

Geriadur ar Vezekniezh

Geriadurioù PREDER

Roparz HEMON, **Geriadur istorel ar Brezhoneg**, eil embannadur
e peder levrenn keinet, 2 880 p. en holl, 335 € (pe e 45 rann 64 p.)

Guy ÉTIENNE, **Geriadur ar Bredelfennerezh**
(galleg, alamaneg, saozneg, brezhoneg), 384 p., 1983

Yann-Baol AN NOALLEG, **Geriadur an Armerzh, ar c'henwerzh
hag an Arc'hant** (galleg, brezhoneg), 326 p., 1995

Guy ÉTIENNE, **Geriadur ar Stlenneg**
(galleg, saozneg, brezhoneg), 544 p., 1995

Guy ÉTIENNE, **Geriadur ar Gorfadurezh**, eil embannadur
(galleg, latin, brezhoneg), 246 p., 1999

Pascal LE MOAL & Guy ÉTIENNE, **Geriadur ar Mediaoù**
(galleg, saozneg, brezhoneg), 360 p., 2000

Yann-Baol AN NOALLEG, **Geriadur ar Jedoniezh**
(galleg, brezhoneg), 174 p., 2003

Gab CHEREL & Alan E. AR BERR, **Geriadur ar Verdeadurezh**
(galleg, brezhoneg), 508 p., 2004

Yann-Baol AN NOALLEG, **Geriadur ar Fizik**
(brezhoneg, galleg), 230 p., 2008

Yann-Baol AN NOALLEG, **Geriadur ar Gimiezh**
(brezhoneg, galleg), 99 p., 2006

Guy ÉTIENNE, **Geriadur ar Vezekniezh**
(galleg, saozneg, brezhoneg),
Rann 1 – Rann 9, 2007 – 2015

Yann-Baol AN NOALLEG, **Geriadur ar Vezekniezh**
(galleg, saozneg, brezhoneg), Rann 10 – Rann 13, 2017 – 2022

Chantal & Yann-Baol AN NOALLEG, **Geriadur ar Geginouriezh**,
172 p., 2011

Guy ÉTIENNE
Bet bredvezeg e klinikenn
Kerfriden Kastellin

Yann-Baol An NOALLEG
Ijinour war ar gimiezh
Bet kelenner war ar jedoniezh
Roazhon

Geriadur ar Vezekniezh

Eil embannadur azgwelet gant Yann-Baol An Noalleg

PREDER
2024

Berradurioù

˘	raguskiban (o verkañ ur pennanv pe ur pennanor adanvaet)
a.	adanv
ao.	adanor
Al.	alamaneg
b.	benel
bn.	bonad
Br.	brezhoneg
BrE.	rannyezh Bro Wereg
Et.	furm etrevroadel
g.	gourel
Gl.	galleg
Gr.	gresianeg
h...	hen (yezh)
hh.	ha pajennoù da heul
It.	italianeg
Iw.	iwerezhoneg
kr...	krenn (yezh)
La.	latin
l.	liester
pa.	pennanv
pao.	pennanor
qqu.	quelqu'un
s.	strollder
SI	Reizhiad Etrevroadel
sk.	skouer
sl.	sellout
Sz.	saozneg
SzAm.	saozneg amerikan
TA	<i>Terminologia Anatomica</i>
u.	unander, unanderenn
ub.	unan bennak
udb.	un dra bennak
UE	Unanenn Etrevroadel
v.	verb

KENTSKRID

Boulc'het seikont vloaz 'zo, pe-dost, pa oa Guy Étienne studier c'hoazh, e c'haller haeriñ ez eo *Geriadur ar Vezekniezh* oberenn aroueziusañ Preder. D'ar 6 Genver 2015 ez ae diazezer an Ti embann ha kentrader ar Geriadur da anaon. Kerkent en deus Yann-Baol An Noalleg devredet pengenniñ al levr, bennozh d'ar c'henlabour dalc'hus etrezañ hag e geneil. Ned eo ket YBAN mezeg, met e stummadur a ijinour war ar gimiezh, ar fizik¹ hag ar jedoniezh, zo bet kevaraezus evitañ da sevel ar peder rann diwezhañ, adalek **polyviscéral** enta, ha goude da aozañ ar geriadur klok.

An dro eo bet da reizhañ un nebeut faziou ha vioù koukou, da ouzhpennañ enmonedoù ha da ensoc'hañ un evezhiadennoù bennak (merket gant *). Hep ket a var e verko an oberenn ul lankad nevez e diorredigezh hon yezh, ha marteze n'eo ket un degouezh e c'hoarvez kement-se en ur prantad turmudus kenan war dachenn ar yec'hed, ar vezekniezh hag an divezouriezh. A-c'houde tri bloaz ez eo bet reveulziet an dud gant darvoudoù hep penn na lost ha ne vo ket tu da dremen hep sevel un dezrann eus an holl draoù sabatuus-se. Ar vezekniezh a chom ar vezekniezh, hogen ar vezeion hag an aozadurioù yec'hed zo da vezañ aterset ha marteze ouzhpenn.

Lezet e vo an oberenn war load Preder e-pad ur prantad, d'an dud da gas evezhiadennoù, ha dimp ni ivez da resisaat hon dezrannoù. Bezet a vezo e chomo moarvat un nebeut mankoù ha da zigarez e c'hellomp lavarout n'eo ket niverus koskor Preder, e-skoaz an aridennad kenlabourerion a gaver boas evit geriadurioù kevatal. Ouzhpennomp ivez e vije bet diaesoc'h al labour hep an aregoù \LaTeX ha X_{\LaTeX} .

¹Ezel eo bet YBAN eus Bodad skridaozañ ar gelaouenn SKIANT eus 1996 da 1999.

KENTSKRIDOÙ AN 13 RANN

(Evit ar rannoù 2, 3 ha 6 hon eus arveret ar skridoù daranvrezh).

Rann 1

Ouzhpenn pemont vloaz 'zo e teraouis prientiñ ar Geriadur-mañ. Studier oan c'hoazh ha boazañ a raen kemer e brezhoneg va notennoù er c'helc'hvaoù. Ur wech distro da Vreizh e stagis da bleuskañ an danvez krai daspugnet e-doug va bloavezhioù Skol veur. Kentañ disoc'h e voe *Geriadur ar Gorfadurezh* deuet er-maez e 1960 e embannadur kentañ. Un tamm mat ec'honoc'h ha kempleshoc'h avat eo park liesdiskiblezh ar Vezekniezh eget liorzhañ vrintin ar Gorfadurezh. Teir amprouenn amjestr a 'm gortoze war va hent :

– diouer ul lavar unvan : hep kontañ niver an hennadoù da envel (ur geriadur micherel hollek a Vezekniezh zo ennañ un 30 000 enmoned), e paota an anvadoù roet da bep hennad e pep yezh ;

– an treuzfurmadioù herrek ouzh herrek o deus nevezet an imbourc'h hag an embreg er pergont bloavezh diwezhañ da heul dispakadur ar skiantoù arnevez : Stlenneg, Korrfizik, Bevgimiezh, Bevoniezh volekulel, Hangaoniezh, Hiloniezh, ... ;

– ezvezañs ur framm skolveurel brezhonek gouestlet da skiantoù an den ha, da gentañ, diegi ar vrezhonegerion da ren ur vuhez kefredel en o yezh.

Gorrek eo bet va c'herzhed enta. Dav din anzav ivez ez on aet war-raok a□frapadoù, o venel alies mizvezhioù ha bloavezhioù hep digeriñ va fichennaouegi mezegel. Ha hevlene pa 'm eus divizet stagañ da embann ur geriadur e 'm eus stadet e oa da sevel ur vostad melladoù nevez ha da adpluennañ un darn vras eus ar re gent evit derc'hel kont eus an araokadennoù c'hoarvezet abaoe o skridaozadur.

Dreist hon galloud e vije bet embann *Geriadur ar Vezekniezh* en un taol, pa vo ennañ etre 1 800 ha 2 000 pajenn. Divizet eo bet enta kas ar mouldadur dre rannoù evel ma voe graet evit *Geriadur istorel ar brezhoneg*. D'ober pep rann ez ay div lodenn : war ar 160 pajenn gentañ (moulet war baper gwenn) e vo un tamm eus korf ar Geriadur hag ar pajennoù da heul (moulet war baper a liv) a roy lec'h d'ur Gerva.

Korf ar Geriadur a c'hoarvez a velladoù titlet gant pep a dermen en o furmoù gallek, saoznek ha brezhonek, heuliet gant an despizadur brezhonek anezho. En tu all d'ar melladoù e vez isvelladoù renket ivez diouzh urzh al lizherenneg, graet gant bommoù gallek-brezhonek en dro d'un termen pe d'e zeveradoù. Pleustret e voe endeo hevelep klokadur dre isvelladoù e *Geriadur ar Bredelfennerezh* ma edo tennet ar bommoù skouer eus ar melladoù embannet el levr end-eeun. Gant *Geriadur ar Vezekniezh* e tuont ivez eus al levr a-bezh, eleze eus ar rannoù bet embannet hag eus ar re diembann c'hoazh.

Ar Gerva zo roll brezhonek-gallek an termennoù mezegel arveret er Rann, anezho pe nevezc'herioù hag amprestoù, pe gerioù gwriennet er yezh ha kemeret en ur ster arbennik. Talvoud a ra ar Gerva da venegva war un dro pa vez klokaet pep enmoned ennañ gant daveoù da bajennoù ar Geriadur.

Digenvez n'on ket en embregerezh. War roudoù pirc'hirined all an dezerzh e valean : François Vallée a skaras diazezoù hag araezioù diorren brezhoneg an devezout ; Roparz Hemon a roas tro d'ar skiant da zont

tre e brezhoneg dre an nor en doa digoret d'al lennegezh — unan eus chañsoù va buhez eo bet e gaout da vlenier war va c'hammedoù kentañ er yezh resis : seul briziusoc'h din e vreutadurioù ma oa disheñvel va durc'hadurioù kefredel diouzh e re. Meneg dibar a ran eus Goulven Pennaod a lakae e anaoudegezh don ha ledan eus ar yezhoù hag ar Yezhoniezh e kerz gwastadourion ar yezh arnevez. Dleour on ivez da aozerion a asantas fiziout o labourioù e Preder : Arzel Even e gentelioù *Bevoniezh* (1961), Per Denez e levr skol *Al Loened* (1965), Gab Cherel e zornlevr a leuñvouriezh *An Ardivink denel* (1969), Yann-Baol An Noalleg e zornlevrioù skolel ha skolveurel a Jedoniezh ha skalfad e c'heriadurioù *Armerzh* (1995), *Jederezh* (1999), *Jedoniezh* (2003), *Fizik* (2006), Gab Cherel hag Alan Ar Berr o *Geriadur ar Verdeadurezh* (2004). Ankouaat ne ran ket Martial Ménard hag ar skipailh a roas d'ar brezhoneg e gentañ geriadur hollek unyezhek nag ar bodad skiantourion a vez o prientiñ un deskadurezh vrezhonek uhel hag o deus roet un alberz anezhi dre ar gelaouenn ΣKIANΤ...

Un atersig da glozañ ar c'hentskrid-mañ : o vezañ ma 'z eo nes da vann an debegezh ma welin embannet Rann diwezhañ *Geriadur ar Vezekniezh*, pe debegezh zo ma ve sammet ar bec'h gant chougoù yaouank ?

Guy ÉTIENNE

Rann 2

Setu embannet eil levrenn *Geriadur ar Vezekniezh* ha lakaet e gouloù 320 eus an 2 000 pajenn a yelo d'ober an oberenn.

Boulc'het ouzhpenn pemont vloaz 'zo pa oa an aozer studier c'hoazh, ez eo bet azveret ar Geriadur-mañ a-hed ar bloavezhioù a-geñver gant araokadennoù ar vicher ha dispakadur diskiblezhioù nevez evel an Hangaoniezh hag ar Vevoniezh volekulel.

A ziv lodenn e c'hoarvez pep Rann : ar 160 pajenn gentañ, moulet war baper gwenn, zo un tamm eus korf ar Geriadur ; ar pajennoù da heul moulet war baper a liv (75 anezho er Rann-mañ) a ro lec'h d'ur Gerva.

Korf ar Geriadur a c'hoarvez a velladoù titlet gant pep a dermen en o furmoù gallek, saoznek ha brezhonek, heuliet gant an despizadur brezhonek anezho. En tu all d'ar melladoù e vez isvelladoù renket ivez diouzh urzh al lizherenneg, graet gant bommoù gallek-brezhonek en dro d'un termen pe d'e zeveradoù.

Ar Gerva zo roll brezhonek-gallek an termenoù mezegel arveret er Rann, anezho pe nevezc'herioù hag amprestoù, pe gerioù gwriziennet er yezh ha kemeret en ur ster arbennik. Talvout a ra ar Gerva da venegva war un dro pa vez klokaet pep enmoned ennañ gant daveoù da bajennoù ar Geriadur.

Rann 3

Setu lakaet e gouloù 480 eus an 2 000 pajenn a yelo d'ober *Geriadur ar Vezekniezh*.

Boulc'het ouzhpenn pemont vloaz 'zo pa oa an aozer studier c'hoazh, ez eo bet azveret ar Geriadur-mañ a-hed ar bloavezhioù a-geñver gant araokadennoù ar vicher ha dispakadur diskiblezhioù nevez evel an Hangaoniezh hag ar Vevoniezh volekulel.

A ziv lodenn e c'hoarvez pep Rann : ar 160 pajenn gentañ, moulet war baper gwenn, zo un tamm eus korf ar Geriadur ; ar pajennoù da heul moulet war baper a liv (87 anezho er Rann-mañ) a ro lec'h d'ur Gerva.

Korf ar Geriadur a c'hoarvez *a*) a velladoù titlet gant pep a dermen en o furmoù gallek, saoznek ha brezhonek, heuliet gant an despizadur brezhonek anezho, *b*) a isvelladoù graet gant bommoù gallek-brezhonek en dro d'un termen pe d'e zeveradoù.

Ar Gerva zo roll brezhonek-gallek an termenoù resis arveret er Rann, anezho pe nevezc'herioù hag amprestoù, pe gerioù gwriennet er yezh ha kemeret en ur ster arbennik. Da heul pep termen emañ dave ar pajennoù m'en kaver e korf ar Geriadur. A bouez eo merkañ eo bet aozet ar Gerva gant ar preder da aesaat donedigezh ar remziad nevez er yezh skiantel.

Rann4

Gant pevare levrenn *Geriadur ar Vezekniezh* e teu e gouloù 640 eus an 2 000 pajenn a yelo d'ober an oberenn.

Boulc'het ouzhpenn pemont vloaz 'zo pa oa an aozer studier c'hoazh, ez eo bet azveret ar Geriadur-mañ a-hed ar bloavezhioù a-geñver gant araokadennoù ar vicher ha dispakadur diskiblezhioù nevez evel an Hangaoniezh hag ar Vevoniezh volekulel.

A ziv lodenn e c'hoarvez pep Rann : ar 160 pajenn gentañ, moulet war baper gwenn, zo un tamm eus korf ar Geriadur. Hemañ a c'hoarvez a velladoù titlet gant pep a dermen en o furmoù gallek, saoznek ha brezhonek, heuliet gant an despizadur brezhonek anezho. En tu all d'ar melladoù e vez isvelladoù renket ivez diouzh urzh al lizherenneg, graet gant bommoù gallek-brezhonek en dro d'un termen pe d'e zeveradoù.

An eil lodenn, moulet war baper a liv (85 anezho er Rann-mañ), a ro lec'h d'ar Gerva brezhonek-gallek eus an termenoù mezegel arveret er Rann, anezho pe nevezc'herioù hag amprestoù, pe gerioù gwriennet er yezh ha kemeret en ur ster arbennik. Notet e vo un emdroadur e doare ar Gerva : a-dal d'un niver war gresk a dermenoù brezhonek e kaver kevatalioù gallek ha saoznek liesger hag a-c'hinsell bommoù brezhonek dirak termenoù allyezh unger 'zo. An arouez eo emañ ar brezhonek o c'hounit un emrended c'heriadurel a live gant e emrended yezhadurel

Rann5

Heñvel eo kentskrid ar Rann 5 ouzh hini ar Rann 4.

Rann 6

Setu embannet c'hwec'hvet levrenn *Geriadur ar Vezekniezh* ha lakaet e gouloù 960 eus an 2 000 pajenn a yelo d'ober an oberenn.

Boulc'het ouzhpenn pemont vloaz 'zo pa oa an aozer studier c'hoazh, ez eo bet azveret ar Geriadur-mañ a-hed ar bloavezhioù a-geñver gant araokadennoù ar vicher ha dispakadur diskiblezhioù nevez evel an Hangaoniezh hag ar Vevoniezh volekulel.

A ziv lodenn e c'hoarvez pep Rann :

Ar 160 pajenn gentañ, moulet war baper gwenn, zo un tamm eus korf ar Geriadur. Hemañ a c'hoarvez a velladoù titlet gant pep a dermen en o furmoù gallek, saoznek ha brezhonek, heuliet gant an despizadur brezhonek anezho. En tu all d'ar melladoù e vez isvelladoù renket ivez diouzh urzh al lizherenneg, graet gant bommoù gallek-brezhonek en dro d'un termen pe d'e zevedadoù.

An eil lodenn moulet war baper a liv (77 anezho er Rann-mañ) a ro lec'h d'ar Gerva brezhonek-gallek eus an termenou mezegel arveret er Rann, anezho pe nevezc'herioù hag amprestou, pe gerioù gwriziennet er yezh ha kemeret en ur ster arbennik.

Bep ma 'z a war raok aozidigezh ar Geriadur, e spisa pennaennoù an dibab etre du-mañ ha du-se, etre sevel termenou diwar loazioù piauvel ar brezhoneg hag amprestañ furmoù allyezh — emdroadur hemañ o kendeurel da reiñ pleusk d'ar blein sevenadur o tiwanañ er c'horn bed-mañ.

Rann 7

Gant ar Rann 7 emañ graet ouzhpenn an hanter eus *Geriadur ar Vezekniezh*. Ar 1 220 pajenn embannet hon laka da verzhout spisoc'h tuiou gwan ha kreñv ar brezhoneg el lavar kempred.

Dilezet e-doug ur milved gant e yezherion kerkent ma vennent treiñ ouzh an dazont, e chom gantañ un dilañs na vo ket diverket diouzhtu. Burzhud eo avat ar gweleadoù danvez krai kousket en e gondon, hag int ken puilh m'emañ c'hoazh en e zeroù ar c'horvoñ anezho goude daou gantved eztennerezh.

Daou orin ez eus d'ar barregezhioù a zo e kerz ar vrezhonegerion hiziv war dachenn ar gouzout hag an devezout :

– diouzh un tu, ar boniad loazioù lavarel gwerc'h, frank a bep plomadur hanezel, o c'houzediñ abaoe ar c'heltieg hag ar yezhoù evodet dioutañ,

– diouzh an tu all, ar “yezh etrevroadel”, daskenvod birvidik amprestou henc'hresianek ha latin ma voaz devezourion hag imbours'herion Kornog da buñsañ o c'hentaozadoù abaoe ar Grennamzer.

Goude ur prantad tastonerezh etre daou zurc'hadur, hollvrezhonekaat lavar ar skiant hag ar preder (hent kantradet gant Vallée), holletrevroadelaat an diskiblezhioù kempred e-maez al lennegezh (diskoulm a guzulie Roparz Hemon), e tennomp hiziv da bleustriñ un hent etre, anezhañ etrevroadelaat ar skritelloù (*oksigen* a lavarer ha n'eo ket *trenkgan* evel ma kinnige Vallée), brezhonekaat an devezout, ac'hoel an unvezioù yezh o tec'heriañ kealioù (ne lavarer ket *izoliñ* evel ma alie Roparz Hemon, met *difuiñ*, *goubarañ*, *dredañ*, *emdennañ*, *digengeziñ*, *digempezhiañ*, *eskantañ*, h.a. hervez an diskiblezh hag an arster).

N'eus ket eno ur reolenn strizh. E meur a zegouezh ma vije bet kenkoulz degemer an termen etrevroadel, en deus aozer *Geriadur ar Vezekniezh* divizet mont gant hent Vallée. Dre lies abeg, dreist holl en askont da resister ar c'hedrannoù brezhonek, (ar skalfad rakgerioù *is-*, *gou-*, *ol-*, *lav-*, *endan-* da skouer, a-dal d'ar c'hevatalioù *hypo-*, *sub-*, *sous-*), pe c'hoazh da hirder an termenou (lakaomp a-geñver *elruz* ha *érythrocytose*, *polycythaemia*)...

Dalc'homp bezant en hon spered, evelkent, ne oufe ur geriadur savet en ezvezañs ur gevredigezh a yezherion bezañ estreget danvez ul lavar bev.

Rann 8

Setu 60 vloaz ma pad aozerezh Geriadur ar Vezekniezh ha sklaeroc'h eo deuet va sell war an embregadenn. Houmañ a intentan evel goustennet etre tri ampar : keñver ar yezher ouzh ar pezh a gomz anezhañ, harzded ar vrezhonegerion, ar c'heinañ ouzh ar yezhoù all.

Ar c'heñver louet ouzh divoud ar c'homzoù, a lavarer, eeunoc'h : ar mont d'an traoù o unan. Lodek eo ar c'hleñvedoù en hon buhez ha preder bras an holl sevenadurioù eo kas war raok an anaoudegezh anezho hag ar parraat outo. Geriadur mezekniezh an 21^e kantved ne oufe enta bezañ estreget un nevezadur eus ar geriadurioù allyezh kent, ne nep doare ne ve un eilad anezho.

Pa arbenn ouzhin ur c'henvroad : “Ne gomprenan ket ar gerioù a arverit”, ez a sklaer dezhañ diouzhtu kevatal gallek ar bommoù a chome dreist e ziraez e brezhoneg. Un heuliad eo d'ar soubadur er gedvuhez c'hallek — en ezvezañs ur gedvuhez e van estren ar yezh. Ar gedvuhez vrezhonek ne ra ket diouer koulskoude. Soliet emañ war oberennoù an aozerion a zalc'h, abaoe tri c'hantved betek hiziv, da herouezañ ar brezhoneg.

Hep hengoun mezegel emañ direet ar brezhoneg da geinañ ouzh ar yezhoù all, resisoc'h, ouzh ul lavar etrevroadel dindan reolerezh an American English ; hemañ, diziouerus d'ar c'hehenterezh etre imboure'herrion ar blanedenn, prizius evel yezh kein hollvedel, a denn e zanzev eus ar yezhoù tal gwriziennet pep hini en ur gedvuhez dibarek. Evit an diwezhañ deuet, ar brezhoneg, a ziskouez endeo bezañ e tro da bourchas loazioù d'ar preder mezegel.

Rann 9

War raok ez a rann 9 Geriadur ar Vezekniezh. Hogos an 3/4 eus korf al levrenn 'm eus skridaozet. Degouezhet on gant plasma... Spi 'm eus e talc'ho va yec'hed betek **Z**... A du 'rall pa zegouezhin en tu all, e klevin gant Roparz Hemon : « Me, da nebeutañ, zo aet betek penn Geriadur istorel ar brezhoneg ! Ha n'out ket bet gouest d'ober evel don ? »

(Guy Étienne, 19 Eost 2014)

Goude 60 vloaz a labour tenn evit reiñ un dazont d'ar brezhoneg eo aet Guy Étienne da anaon d'ar 6 Genver 2015.

Edo oc'h echuiñ rann 9 Geriadur ar Vezekniezh pa 'z eo klañvet. Chomet e oa digor e urzhiataer war ur bajenn eus al levrenn-mañ pa 'z eo bet klañvdiat en ospital Kemper. O tistreiñ d'e di e Kastellin d'an 2 Genver en doa spi peurechuiñ unan eus e oberennoù meur : Geriadur ar Vezekniezh.

Al levrenn-mañ zo bet prientet d'an embann gant skipailh Preder.

Kendalc'h et e vo da embann ar rannoù diwezhañ, eus *Polyviscéral* da *Zymotique*, o soliañ war an dielloù en deus lezet.

Rann 10

E kentskrid Rann 1 Geriadur ar Vezekniezh e skrive Guy Étienne kement-mañ :

“*Un atersig da glozañ ar c’hentskrid-mañ : o vezañ ma ’z eo nes da vann an debegezh ma welin embannet Rann diwezhañ Geriadur ar Vezekniezh, pe debegezh zo ma ve sammet ar bec’h gant chougoù yaouank?*”

Dek vloaz diwezhatoc’h e c’hellomp respont ned eo ket ken yaouank-se choug Yann-Baol An Noalleg, hogen sammet eo bet ar bec’h ha mennet eo an aozour-se da bengenniñ oberenn e geneil aet da anaon. Ar vadelezh he deus bet an Itron Gizella Étienne da lakaat en e gerz pemp klenkell — betek *zygot-* —, ma kaver un nebeut notennoù skrivet gant ur skriverez ha gant an dorn, eleze kent amzer arver an urzhiataerioù, gant koskor Preder da nebeutañ.

Dav teurel evezh avat, rak kalzik a frazennoù, a c’herioù zo bet dilezet ha kemmet da heul gant Guy Étienne ha gwell en deus kavet aozour ar Rann 10 soliañ war an nav Rann embannet betek bremañ.

Hag eñ ijinour war ar Gimiezh ha kelenner Jedoniezh, Yann-Baol An Noalleg ned eo ket arbennikaet war ar Vezekniezh ha furoc’h en deus kavet reiñ da lenn ar Rann 10 d’ur mezeg. Hogen ouzhpenn 40 vloaz a eskemmoù etre kentrader ha kendalc’her *Geriadur ar vezekniezh* (sl. ar steudad LAVAR) o deus kevaraezet aozour ar Rann 10 bezañ e-tailh da “sammañ ar bec’h war e choug”.

Rann 11

Setu 11vet Rann Geriadur ar Vezekniezh, o tont er-maez tri bloaz war-lerc’h an 10vet Rann. Dre genderc’hel labour Guy Étienne e tiskouez Yann-Baol An Noalleg en deus ar brezhoneg tizhet ul live geriadurel kevaraezus da sevel oberennoù e diskiblezhioù ken arbennikaet hag ar Vezekniezh, hep bezañ mezeg e unan. An un stadadenn a oa bet graet a-gent evit ar Gimiezh, pa weler ez eus bremañ tud varrek da embann labourioù war an diskiblezh-se, er yezh resis diazezet gant aozer al levr-mañ. Hep ket a var e welimp kent pell ivez, muioc’h-mui, pennadoù a-zivout kraf pe graf a Vezekniezh, en ur yezh ken resis all. Tu zo enta da lavarout ez eo “saveteet” ar brezhoneg : Preder en deus kendaolet da grouiñ ar binvioù rekis da genderc’hel gant herouezadur hon yezh ha, nep piv bennak a gemer ar boan d’emstummañ en un doare sirius dre harpañ war steudad al Lavaroù, war ar geriadurioù arbennikaet embannet gant Preder, ha levrioù all ivez, zo e-tailh da grouiñ oberennoù kevatal evit diskiblezhioù all.

Hogen gant an dud emañ an dalc’h. Neoazh, fiziañs a c’haller kaout pa weler ar preder a vez kemeret gant dazont ar vro. Teñval an dremmwel koulskoude ha nerzhoù kontrol a weler o krozal c’hoazh. Er blegenn arvarus ma emamp, emañ retoc’h eget biskoazh emstummañ war a bep seurt diskiblezhioù, ha krouiñ ar sternioù a gemero e karg an ensavadurioù a vo diziouerus evit derc’hel ar vro en he flom.

Rann 12

Setu 12vet Rann Geriadur ar Vezekniezh, pengennet en amveziadoù iskis ha digunvez. Aozer ar Rann-mañ en deus stadet diouzhtu ne oa ket anv eus koronavirus er Rannoù kent. Ha padal emañ an enmoned *Coronavirus* en embannadur 1985 ar *Garnier-Delamare* hag er *Flammarion* 1975 e kaver ivez *Coronaviridae*, ur seurtad viruz RNA kiriek da “frifoioù ha fric’hargadennfoioù an oadourion yaouank”. Tra ken. N’eo ket al lec’h amañ da zezrannañ an darvoudoù, hogen diaes e vo gwelout un nebeut aozadurioù yec’hed er par bedel, europat pe riezal, en hevelep doare hag a-raok. Heñveldra, an holl gwitibunan o devo klevet komz eus divoudoù o tennañ d’ar Vezekniezh, ar viruzoù, ar vaksinoù, an RNA kannad, an hangae, h.a. A zo muioc’h :

ar c'hudennoù yec'hedel o deus kemeret ul lec'h gourfouezus e leviadurezh ar Stadoù, bennozh d'an araez gweredus meurbet a zo aon an dud rak ar c'hleñved, ha rak ar pezh a zo finvez diwezhañ mab-den.

An oberenn, boulc'het 17 vloaz 'zo gant Guy Étienne ha kendalc'het gant Yann-Baol An Noalleg, a gemer neuze ul liv hag ur pouez nevez gant an darvoudoù. E teu enta da vezañ ur benveg a gevaraez meizañ pezh a hañval bezañ degaset gant an tonkad. Hep ket a var e vo dav klokaat eil maladur *Geriadur ar Vezekniezh*. Gortozomp, avat, ma tremeno an amzer war-benn dilavañ lanv an darvoudoù liesseurt.

Ur spi hon eus : lakaat galvedigezhioù da sevel er yaouankiz evit ma teufe ar Vrezhoneg da emouestlañ en un diskiblezh a oa un arbennigiezh uhel pleustret gant hon diagentidi. Ra savo mezeion, enklaskerion war a bep seurt diskiblezhioù, sed ar pal a vukomp outañ a-zevri.

Rann 13



Dalc'h labour e Kastellin, Eost 1996.

Rann 13 *Geriadur ar Vezekniezh* a verk diwezh un hir a avantur. Guy Étienne, studier war ar Vezekniezh e Paris, a gemere e notennoù e brezhoneg war-eeun. E 2007 e voulc'has skridaozerezh an oberenn dre ziazezañ war labourioù e ziagentourion, Vallée, Hémon, war skoazell hep he far Goulven Pennaod ha war e anaoudegezh don eus ar yezhoù hag eus ar yezhoniezh, hep ankounac'haat ar c'henlabour diastal gant izili Preder, an holl anezho gwriennet en un deodyezh lec'hel hag o vestroniañ ar brezhoneg arnevez kempred. Menegomp Alan E. Ar Berr (aozer gant Gab Cherel ar *Geriadur ar Verdeadurezh* (2004)), Gab Cherel (*An Ardivink denel* (1969)), Yann-Baol An Noalleg (aozer lies geriadur ha levr, *Geriadur an Armerzh, Fizik, Kimiezh, Jedoniezh, Keginouriezh, Jederezh*, h.a. Ezel Bodad skridaozañ ar gelaouenn skiantel ΣΚΙΑΝΤ eus

1996 da 1999. Ha barzh ivez).

D'ar 6 Genver 2015, war-lerc'h 60 bloavezhiaad a labour tenn ez ae Guy Étienne da anaon, e-doug skridaozerezh Rann 9 *Geriadur ar Vezekniezh*. Kerkent e stage skipailh Preder ganti evit pengenniñ ar Rann-se. Ha diouzhtu war-lerc'h e kemere Yann-Baol an Noalleg ar bec'h war e choug, e sell da genderc'hel hag echuiñ al labour pouezus-se. Anv ebet d'e lezel e skourr ! N'eo ket bet aes bepred, aze emañ an disoc'h avat (trugarez da Marie-France ha Mikael Coïc evit o reizhadennoù). Ha bremañ hon eus un oberenn ramzel, dezhi 15 506 enmoned, a vo lakaet war load PREDER, d'an dud da gas dimp o evezhiadennoù.

SpIann eo ar pal : e-kerz an hanter gantved tremen en deus PREDER diazezet un nebeut araezioù a amparo sol diorredigezh dazont hon yezh hag ivez sol hon dazont evel stroll denel war startaat ent politikel hag ent kevredigezhel. Adalek bremañ emañ ar vrezhonegerion yaouank o krouiñ liammoù strizh gant izili kozh PREDER, hag en doare-se e c'hellont kreñvaat o anaoudegezhioù, bennozh d'an holl labourioù hegerz, ent dibarek ar steudad LAVAR a gendalc'h da greskiñ.

A

abactériémique ◇ ◇ **gwadanvakteriek** aa. A-zivout ur c'hleñved ma ne gaver ket bakteri e gwad ar gouziviad.

abaisse-langue ◇ **tongue depressor** ◇ **palig** b. **teod** Astell vihan koad pe vetal arveret da c'houzizañ an teod evit ensellout ar gorzailhenn.

abaiss-

- *abaissement de la pression artérielle* iswask talmerel
- *abaissement de la température* leiâd ar gwrezverk
- *abaissement des défenses immunitaires* leiadur an difennoù hangae
- *abaissement brusque des paupières supérieures* gouzizad trumm ar malvennoù krec'h
- *abaissement du taux de gaz carbonique dans le sang* gwadisvec'h an dioksidenn garbon
- *abaisser l'énergie d'activation* leiaat ar gremm blivaat
- *abaisser la tension superficielle* leiaat an tennder gorre
- *mouvements d'élévation et d'abaissement de l'œil* fiñvoù gorren ha gouzizañ al lagad, fiñvoù krec'hduañ ha traoñduañ.

abandon : **névrose d'~** ◇ **neurosis of abandonment** ◇ **neuroz** g. **emzivated** Neuroz naous dre an enkrez a vezañ dilezet hag an ezhomm diogelroez.

abandonnique ◇ ◇ **1 emzivadek** aa. **2 emzivadeg** g. **-eion** 1 O c'houzañv an neuroz emzivated. 2 Gouziviad an neuroz emzivated.

abarticulaire ◇ **abarticular** ◇ **ec'harzel** aa. E-maez an arzoù, na dizh ket an arzoù.

abasie ◇ **abasia** ◇ **ankerzh** g. Koll ar galloud da deurel ar c'horf war raok evit deraouiñ fiñvoù ar c'herzhed.

abasique ◇ **abasic** ◇ **1 ankerzh** aa. **2 ankerzh** g. **3 ankerzh** aa. 1 Gant an ankerzh. 2 Gouziviad an ankerzh. 3 A-zave d'an ankerzh.

abattement ◇ **exhaustion** ◇ **mantr** g. Dinerzh bras a gorf hag a spered, fillidigezh, grevadurezh.

abcéder ◇ ◇ **pugneziñ** Treiñ e pugnez.

abcès ◇ **abscess** ◇ **pugnez** g. **-où** Hogennad lin e-barzh ur gavenn nevezfurmet diwar goust ar gwiadoù trodro.

abcès arthriftuent ◇ **arthriftuent abscess** ◇ **pugnez arzloezus** Pugnez yen dinodet diwar anaf ur c'henvell, torzhellek hogos bepred, o tevoudañ distruj ar c'henvell hag alies oc'h emastenn pell diouzh an annon, sk. : pugnez ar varlenn diwar un annon torzhellek el livenn gein.

abcès en bouton de chemise ◇ **bicameral abscess, shirt-stud abscess** ◇ **pugnez divc'hodell** Pugnez hevonn anezhañ div gavenn kehent dre ur mulgul; c'hoarvezout a ra pa emastenn ur pugnez a-dreuz d'ul lientirenn.

abcès caséeux ◇ **caseous abscess** ◇ **pugnez keuzennek** Pugnez yen torzhellek leun gant keuzenn.

abcès chaud ◇ **acute abscess, hot abscess** ◇ **pugnez gor, gor** g. **-ioù** Daspugnad lin gant arouezioù an danijenn lemm.

abcès de fixation ◇ **fixation abscess** ◇ **gor delenañ** Hentenn gurañ, dilezet hiziv, anezhi ensinklañ eoul tourmantin war-benn dec'han ur pugnez ha daspugn ar bakteri war amred dre ar bevedeg.

abcès froid ◇ **cold abscess** ◇ **pugnez yen** Daspugnad lin amparet gorrek hep arouezioù tanijenn, diwar an dorzhellegezh pe mikoziou 'zo.

abcès métastatique ◇ **metastatic abscess** ◇ **pugnez dassezek** Pugnez diwar un enfroù lestek diouzh un annon loet pell pe belloc'h.

abcès ossifluent, abcès par congestion ◇ **ossifluent abscess** ◇ **pugnez askornien** Pugnez yen torzhellek er parzhioù meizh dezhañ da orin un annon tanijenn en askorn pe en amaskornenn (kleñved Pott).

abcès

- *abcès amibien* pugnez amoebel
- *abcès chronique du poumon* pugnez henek ar skevent
- *micro-abcès* korrbugnez.

aberrant ◇ **aberrant** ◇ **gouskoev** aa. O forc'hiñ diouzh ar reolded dre e luniad, e sez, e arc'hwelerezh.

aberration ◇ **aberration** ◇ **gouskoevad** g. **luc'hel, mistiegezh** b. Si en ur reizhiad optikel o tevoudañ distummadur pe dispisted er skeudenoù; seurt si er stiegezh a c'hell disoc'h gant furmidigezh ur skeudenn outi orennoù liesliv pa vez argemmus

ar feuriader gouskogañ hervez trohedoù al luc'h (mistiegezh trohedel, gouskoevad trohedel); gant skeudennoù loet en un dalenn digenstur da dalenn an traezennoù (mistiegezh krommder, gouskoevad krommder, amstiegezh).

aberration chromosomique ◇ **chromosome aberration** ◇ **gouskoevad kromozomel** Nep distresadur eus an dafar kromozomel a-fet niver pe luniad.

aberr-

• *artère systémique aberrante* talmerenn drogorfel gouskoev • *est aberrant ce qui s'écarte de la normale par sa structure, son siège ou son fonctionnement* gouskoev eo pezh a forc'h diouzh ar reolled dre e luniad, e sez pe e arc'hwelerezh.

abiotrophie ◇ **abiotrophy** ◇ **abiotrofezh** b. Dic'henezhadur an nervreizhiad e rezh anafoù en neuron, dianav evit c'hoazh e arbenn.

ablactation ◇ **ablactation** ◇ **laezhastal** g. Paouez al laezhvorc'hañ; heñvelster boazel : *dilaezhañ*.

ablatif : méthodes ~ves ◇ **catheter ablation** ◇ **hentennoù dileññ** Kalvezderioù distruj lec'hiek ar rehentoù kalon gwezhiat ouzh migorvezioù grevus 'zo.

ablation, résection ◇ **ablation** ◇ **ezvenañ, dazbidañ** Dilemel surjanel un organ, ul lodenn eus ar c'horf, ur yoc'henn, h.a.

ablépharie ◇ **ablephary** ◇ **anvalvenn** g. Ezvezañs hollle a-c'hanedigezh a 'r malvennoù.

abolir

• *abolir la contracture* steuziñ an dargrezañ • *l'abolition de toute pression artérielle* mannelezh ar gwask talmerel • *l'abolition de toutes les sensibilités* steuzidigezh holl vodoù an eraziñ • *abolition des réflexes tendineux* steuz an damougoù a-stirenn.

abondant

• *un abondant tissu conjonctif* ur gwiad kenglenel paoterek.

aborder

• *aborder chirurgicalement* diraez ent surjanel.

abortif ◇ **abortive** ◇ **1 sioc'hus** aa. **2 sioc'han** aa. **3 sioc'han** g. -ed **4 sioc'hanus** aa., ~**sioc'hanañ** **5 sioc'hanuzenn** b., **sioc'haner** g. 1 O treiñ krenn, a-zivout ur c'hleñved. 2 A-zivout ur grouell nad eo ket aet betek he zermen. 3 Krouell nad eo ket aet betek he zermen. 4 O tevoudañ ar sioc'hanañ. 5 Danvezenn sioc'hanus.

abouchement

• *abouchement du canal cystique* difourc ar san gellenn • *abouchement du colon à la paroi* skarvañ ar c'holon ouzh ar speur • *anastomose : abouchement naturel, pathologique ou chirurgical de deux vaisseaux* dasforzhañ : pennegiñ bonan, kleñvedel pe surjanel div wazhiedenn.

aboulie ◇ **abulia** ◇ **anyoul** g. Gwanded pe koll ar youliñ.

aboulique ◇ **abulic** ◇ **1 anyoulek** aa. **2 anyouleg** g. **3 anyouel** 1 Gant an anyoul. 2 Gouziviad an anyoul. 3 A-zave d'an anyoul.

abrachie ◇ **abrachia** ◇ **anvrec'h** g. Ezvezañs c'hanedigel an divvrec'h.

abrasion ◇ **abrasion** ◇ **1 graspad** g. **2 kignad** g., **garchennad** g., **taravad** g. **3 taravad** **4 bliañ, reñviañ** 1 Gouli bas o tizhout an ezkroc'hen hepken. 2 Gouli diwar rasklañ o tiraev an donenn pe ar gwiadoù donoc'h. 3 Uzadur bonan pe gleñvedel an dent. 4 Lemel dre rasklañ gwiadoù pe furmadoù 'zo (sl. *dermabrasion*).

abrasion

• *excision ou abrasion des tissus nécrosés* amnaziñ pe vliañ ar gwiadoù marvennet.

absence ◇ **absence** ◇ **dianenn** b. Erzerc'had naouus d'an droukfell leiek, anezhañ blinaenn pe spanaenn verrbad (etre 2 ha 15 s) ar bredarc'hwelioù uhel (kenskiant, merzhout), azonet en empennvarvezañ gant un diskarg pikbaotou korvezek 3 c/s.

absen-

• *absence d'oxygène dans le sang* diouer (isvec'h) oksigen er gwad • *en l'absence de tout facteur microbien* en ezvezañs nep parenn c'harvevel • *en l'absence de traitement* en diouer a vezegadur • *dents absentes* dent diank.

absorptiométrie osseuse ◇ **bone absorptiometry** ◇ **lugventañ eskern** Andalañ douester an eskern dre vuzuliañ lugadur ur skinad X pe γ ; kalvezder arveret evit diournat an osteoporoz.

absorption ◇ **absorption** ◇ **1 lugañ** **2 desunañ** **3 euvriñ** **4 sugañ** 1 Leiaat read ar skinoù pa dreuzont un danvez. 2 Stagañ un aezhenn ouzh ul liñvenn pe ur sonnenn. 3 Kemer boued, lonkañ. 4 Heuliad gwikefreoù a laka un danvezenn da zont e diabarzh ar bevedeg dre dreuziñ hep enfrez un epitelienn pe ur glourgenn.

absorb/p-

• *absorbé par voie buccale* euvret dre ar genoù • *absorber le gaz carbonique* desunañ an dioksidenn garbon • *antibiotiques pratiquement non absorbés par l'intestin* bevastalerioù ansuget pe dost gant ar pervez • *absorption d'alcool* euvradur alkool • *absorption du rayonnement* lugadur ar skinañ • *coefficient d'absorption spécifique* gwezhiader lugañ rummel • *malabsorption* misug • *qui n'est pas absorbé par l'appareil digestif* ansugadus gant ar benvegad koazhañ • *matériaux absorbants* danvezioù lugus • *sels d'argent absorbés à titre thérapeutique* halioù argant euvret e ser ur mezegadur • *substance équivalent tissu pour*

l'absorption des rayons X danvez kevatal e lugusted da hini ar gwiadou, danvez keflugus • *surface d'absorption des cellules* gorread sugañ ar c'helligou.

abstergent ◇ **abstergent** ◇ **1 glanaus** aa. **2 glanauzenn** b. 1 Azas da naetaat ar gouliou. 2 Lia glanaus.

abstersion ◇ **abstersion** ◇ **glanaat** Naetaat ar gouliou diwar-bouez lia glanaus (sl. *détersion*).

abzyme ◇ **catalytic antibody** ◇ **abzim** g., **antikorf** g. **treluskañ** Antikorf o piaouañ perzhioù treluskañ a rizh enzimatek (Gl. *abzyme* = *antibody enzyme*).

acalculie ◇ **acalculia** ◇ **arniñv** g. Strafuilh arzeuat er galloud da riñvañ, o virout a zaznaout hag a skrivañ ar sifrou, a aozañ niverou, a jediñ; un arvez eo eus furmoù 'zo a ankomz da-geñver anafoù an droenn gognek.

acanthome ◇ **acanthoma** ◇ **akantom** g. Anv genad ar yoc'hennou kroc'hen diwanet diouzh gwiskad Malpighi.

acanthose ◇ **acanthosis** ◇ **akantoz** g. Anaf ar c'hroc'hen, anezhañ tevadur an epitelienn valpigiel.

acares ◇ **acari** ◇ **akar** s. Loened arvevat eus skourrad an Artropod, gwezherioù an hakrez.

Acaris ◇ **Acari**, **Acarina**, **Mites** ◇ **Akarianed** l. (g.) Urzhad Artropod gougevret ouzh kevrennad an Araknideged.

acariose ◇ **acariasis**, **acarinosis** ◇ **akariaz** g. Klañvadur diwar an akar arvevat.

acathisie, **akathisie** ◇ **acathisia**, **akathisia** ◇ **anpaouez** g. Koll ar galloud da chom difiñv ha da zerc'hel an izili traoñ pell amzer en ul lakadur; stadet e vez an anpaouez e kleñved Parkinson, elfenn eo ivez eus azoniad an "divesker dihabask".

acathisque, **akathisque** ◇ **acathisic**, **akathisic** ◇ **1 anpaouezek** aa. **2 anpaouezeg** g. **3 anpaouezel** 1 Gant an anpaouez. 2 Gouzviad an anpaouez. 3 A-zave d'an anpaouez.

accélér-

- *accélérateur d'électrons* c'hwimmer elektron • *accélération de la pesanteur* c'hwimm ar ponnerder • *accélérer la vitesse des réactions* buanaat an dazgweredoù • *accélérer la sédimentation* muiaat an tizh gouzediñ • *accélérer le rythme* buanaat ar gorvez
- *vitesse circulatoire accélérée* tizh amred muiaet, ustizh amred.

accent-

- *accentuer X, mettre l'accent sur X* arbouezañ X • *dû à l'accentuation d'une composante* diwar greñvaat ur gedrann.

acceptabilité ◇ **acceptability** ◇ **darbennusted** Termen mezhuroniezh o verkañ emzalc'h ur stroll tud e-keñver ur boued, peurliesañ pa vez anezhañ ur boued divoas.

accepteur ◇ **acceptor** ◇ **kluder** g. **-ioù** Keurvolekul kelligel warnañ hanloadoù kimiek en araez da zarbenn danvezennoù bevedel pe liaoù na weredont ket warnañ, a vez hepken kadavet, dezouget ha dasparzhet gantañ er bevedeg (sl. *récepteur*).

accès ◇ **fit**, **attack**, **seizure** ◇ **barr** g., **barrad** g., **kaouad** b. C'hoarvezadur trumm un anadenn gleñvedel; anadenn gleñvedel o c'hoarvezout trumm (sl. *attaque, crise, ictus*).

accès

- *accès de fièvre* barr terzhien • *accès de goutte* barr urlou • *accès de migraine* barr kernad • *accès névralgique* barrad nervost
- *accès de toux* kaouad paz • *permettant l'accès aux cavités du cœur* o reiñ tu da ziraez kavennou ar galon.

accessoire

- *accessoire utilisé en radiothérapie* prest arveret er skingurañ • *voie biliaire accessoire* adforzh vestl.

accident de trajet ◇ **industrial traffic accident** ◇ **darvoud** g. **treizhid** Darvoud c'hoarvezet e-kerz an treug mont pe dont etre al lec'h annez hag al lec'h labour.

accident de travail ◇ **professional accident**, **occupational injury**, **industrial injury** ◇ **darvoud labour** Reuzenn daraezel c'hoarvezet dre berzh pe da geñver al labour.

accident vasculaire cérébral, **AVC** ◇ **cerebrovascular accident**, **stroke** ◇ **darvoud gwazhiedel empenn**, **orc'had g. empenn** Rouestlad empenn lemm eus ur c'hleñved gwazhied, anezhañ ur boukadur (*orc'had boukadel*) pe ur gwadliñv empenn pe empenn-pilhon (*orc'had gwadliñvel*) (sl. *apoplexie, ictus*).

accident(-)

- *accidents rénaux* lounezhadou • *accidents urogénitaux* rouestladoù troazh-gene • *d'origine accidentelle* a-zarvoud • *volontaire ou accidentel* a-ratozh pe a-zarvoud.

accol-

- *accolement d'origine inflammatoire* kempegad diwar danijenn • *maintenir les deux chromatides accolés* derc'hel kempeg an div gromatidenn • *un noyau pyrimidine et un noyau imidazole accolés* ur c'henvell pirimidin hag ur c'henvell imidazol kempeg.

accommodation ◇ **accommodation** ◇ **1 argestummañ** **2 argeidañ** 1 (Amiegouriezh) azasaat lakadur ar grouell diouzh krozh ha lestr ar vamm da geñver ar gwilioud. 2 (Lagadouriezh) perzh al lagad da hestiañ, eleze da zerc'hel, ne vern pegeit ma ve an ergorenn dioutañ, ur skeudenn spis anezhi bennozh da zaskemmoù stumm ha feuriader gouskogañ ar ferenn.

accommodation : **constante d'~**, **constante de climalyse** ◇ **accommodation constant** ◇ **arstalenn argevreadañ** Padvezh ret d'ur red tredan a naou bevennat evit diraez al leiaread.

accommod-

- *réflexe pupillaire à l'accommodation-convergence* mabargrezañ e ser argeidañ-kengerc'hañ

accompagn-

- *accès névralgiques de l'œil accompagnés de larmoiement* barradoù nervost el lagad a-ser gant daeraouiñ • *anémie accompagnant les affections inflammatoires* amwad oc'h amheuliañ an anaezioù foel • *diabète accompagnant des lésions du pancréas* diabet diwar anafoù an ilgreiz • *douleur accompagnée d'hyperesthésie* laur kevret gant uc'heraez • *hypertension artérielle s'accompagnant de complications* uswask talmerel diwarnañ rouestladoù • *trouble accompagnant certaines décharges épileptiques* strafuilh oc'h ambroug diskargoù droukfell 'zo.

accorder

- *accorder un Certificat d'Études Spéciales* debarañ un Testeni Studi Arbennik.

accouchement ◇ **childbirth, accouchement, delivery** ◇ **gwilioud g.** Ezvountad ar grouell hag an dorzhienn diouzh ar forzhioù genel.

accouch-

- *accouchement d'un garçon* gwilioud diwar ur paotr • *accoucher d'un garçon* gwilioudiñ ur paotr, gwilioudiñ diwar ur paotr.

accoutumance ◇ **habitation, acquired tolerance** ◇ **arsoc'h g., tozelladur g.** Gougemerusted arzeuat ar bevedeg ouzh drammoù 'zo (yac'hwezherioù ha pistriennoù), erzerc'h dre ar varregezh da c'houzañv an doenou a ranker muiaat evit diraez an hevelep gweredoù (sl. *addiction*).

accoutum-

- *accoutumé à arsoc'h* ouzh, *arsoc'haet* ouzh • *provoquant l'accoutumance* arsoc'heiat • *provoquer l'accoutumance* arsoc'haat • *s'accoutumer à arsoc'hañ* ouzh, *arsoc'haat* ouzh • *substance provoquant l'accoutumance* arsoc'heiad.

accrétion ◇ **accretion** ◇ **dedolzañ** Kreskiñ tolz dre zegas danvez, sk. : dedolzañ an eskern.

accrochage

- *assurant l'accrochage du spermatozoïde* oc'h ober d'ar spergellig spegañ

accroissement

- *accroissement de l'ovocyte* kresk an ovokitenn.

accroupissement ◇ **squatting** ◇ **puch g., puchañ** Peurblegañ an divlezh hag an daoulin, an daoudroad o chom a-blaen war al leur.

accroupissement : **manœuvre de l'~** ◇ **squatting exercise** ◇ **embreg g. ar puchañ** Embreg arveret da arglask strafuilhoù en tant emstumm.

accroupissement : **signe de l'~** ◇ **squatting posture** ◇ **arouez b. ar puchañ** Emlakadur dibabet alies gant ar vugale galonnaouedek.

accumul-

- *accumulation cellulaire* hogennad kelligoù • *accumulation d'acide homogentisique dans le sang* yoc'hadur an drenkenn homogentizek er gwad • *accumulation de gaz dans le colon* hogennad aezhenn er c'holon • *accumulation de graisses dans l'organisme* daspugn druzoni er bevedeg • *accumulation de granulations graisseuses* tolpad greunigoù druzoni • *accumulation de sang dans les vaisseaux* hogennadur gwad er gwazhied • *accumulation sanguine des corps cétoniques* yoc'hadur ar c'horfoù ketonek er gwad • *fixation et accumulation de l'or dans les tissus* lenañ ha yoc'hañ an aour er gwiadoù.

acétonémie ◇ **acetonemia** ◇ **1 gwadaketonegezh b. 2 gwadvec'h g. aketon** 1 Bezañs aketon er gwad. 2 Feur aketon er gwad.

acétonémique ◇ **acetonemic** ◇ **gwadaketonek** 1 Gant ar wadaketonegezh. 2 A-zave d'ar wadaketonegezh.

acétonurie ◇ **acetonuria** ◇ **troazhaketonagezh b. 2 troazhvec'h g. aketon** 1 Bezañs aketon en troazh. 2 Feur aketon en troazh.

acétylcholine : **chlorure d'~** ◇ **acetylcholin chlorid** ◇ **kloridenn aketilkolin** Hanterad naturel an treuzkasoù kolinergek.

acétylcholinomimétique ◇ **cholinomimetic, acetylcholine-like** ◇ **aketilkolingeveler, aketilkolinvanek** Danvezenn o tec'han gweredoù heñvel ouzh re an aketilkolin.

achalasia ◇ **achalasia** ◇ **angad g.** Skorted al laoskaat gant ur c'helc'hstrishaer pa zegouezh ar gwagennoù argrezañ a-grec'h.

acharnement thérapeutique, dysthanasie ◇ ◇ **arloup g. yac'hadel, ec'handizhañ, ec'handizh g.** Aheurtrezezh da zerc'hel ent kalvezadel an arc'hwelioù bevedel gant ar glañvourion war o zremenvan.

acheirie ◇ **acheiria** ◇ **andorn g.** Ezvezañs c'hanedigel un pe an daou zorn.

achlorhydrie ◇ **achlorhydria** ◇ **aklorhidriezh b.** Ezvezañs an drenkenn glorhidrek e sug ar c'hreuz.

achloroblespie, achloropsie ◇ **achloroblespia** ◇ **gwerangwel g.** Dic'halloud da verzhout al liv gwer.

achondrogenèse ◇ **achondrogenesis** ◇ **migornanpar g.** Furm eizhañ, trankus, ar migornangwe.

achondroplasia ◇ **achondroplasia** ◇ **migornangwe g.** Furm eus miwe an eskern hag ar migern, azonet gant ar gorred hag isvent an izili.

- achromate** ◇ **achromate** ◇ **1 livangwelek** aa. **2 livangweleg** g. 1 Gant al livangwel. 2 Gouziviad al livangwel.
- achromatopsie, achromasie** ◇ **achromatopsia** ◇ **livangwel** g. Dic'halloud, ganedigel pe arzeuat, da verzhout al livioù.
- achromatopsique** ◇ **achromatopsic** ◇ **livangwelel** aa. A-zave d'al livangwel.
- achromie** ◇ **achromia, achromasia** ◇ **anlivegad** g. Brizhenn wenn war ar c'hroc'hen, e dalc'h un direizh en arc'hwel livegañ, hep daskemm all e gorre an ezkcroc'hen.
- 1 2 achromique, 1 dépigmenté** ◇ **1 2 achromic, achromatous, 1 colorless** ◇ **1 anlivegat** aa. **2 anlivegadel** aa. 1 Gant an anlivegad. 2 A-zave d'an anlivegad.
- acidémie** ◇ **acidaemia** ◇ **gwadisph** g., **gwadtrenkegezh** b. Leiadur anreol pH ar plasma.
- acides aminés** ◇ **aminoacids** ◇ **amindrenkennoù** l. (b.) Molekul outo ur soaz trenkenn, karboksilek peurliesañ, hag ur soaz amin, bezant dizalc'h er gwadveiz ha parzhiat er proteinoù; proteinoù ar boued zo enno, diouzh kediadurioù diseurt, ugent amindrenkenn naturel.
- acides biliaires** ◇ **bile acids** ◇ **trenkennoù** l. (b.) **bestlel** Deveradoù trenkek diwar ar c'holesterol, enaozet e-barzh an avu.
- acides gras** ◇ **fatty acids** ◇ **trenkennoù** l. (b.) **druz** Anvad rumm un teskad molekul a zo enno un digorvell hir hidrokarbonek, peurvec'h pe amvec'h, hag ur stroll karboksilek dibenn, lec'h d'ar soaz trenkenn; bevenaozet e vezont evit lod gant ar bevedeg; ar re nad eo ket ar bevedeg evit o enaozañ a reer anezho an trenkennoù druz bevret (Gl. *acides gras essentiels*, Sz. *essential fatty acids*).
- acidification provoquée : épreuve d'~** ◇ **prouad** g. **an trenkekaat** Prouad da imbourc'hiñ reolerezh ar c'hempouez bazenn-trenkenn gant al lounezhi : ar gouziviad a lakaer da euvriñ un doead klorhidrat arginin pe kloridenn amoniom hag e vuzulier pH an troazh.
- acidité titrable de l'urine** ◇ **urine titrable acid** ◇ **trenkegezh** b. **titladus an troazh** Niver ar mmol trenkenn ezvevennet dre an troazh dindan 24 h.
- acidocétose, cétose, céto-acidose** ◇ **ketoacidosis** ◇ **akidoketoz** g. Stad kleñvedel diwar eznevid reñverek al lipid e disoc'h an usvec'h korfoù ketonek hag an akidoz.
- acidogénèse** ◇ **acidogenesis** ◇ **trenkennbarañ** Aozañ trenkenn, unan eus arc'hwelioù al lounezhi.
- acidophile** ◇ **acidophilic, oxyphil** ◇ **trenkennlen** aa. A-zivout an elfennoù kelligel lenidik ouzh al livuzennoù trenkek.
- acidorésistance** ◇ **acidoresistance** ◇ **trenkennharz** g. Perzh gant elfennoù ar gellig herzel ouzh gwered dilivañ un drenkenn veinel pe vevel.
- acidorésistant** ◇ **acid-fast** ◇ **trenkennharz** aa. O herzel ouzh gwered dilivañ an trenkennoù.
- acidose** ◇ **acidosis** ◇ **akidoz** g. Tuadur da usvec'h an ion H⁺ er plasma hag el liñvennoù entremezel.
- acidose**
- *acidose compensée* akidoz kevassavet
 - *acidose décompensée* akidoz ankevassav
 - *acidose hyperchlorémique* akidoz klorwad-usvec'hel
 - *acidose métabolique* akidoz kennevidel
 - *acidose respiratoire* akidoz analadel.
- acidurie** ◇ **aciduria** ◇ **troazhtrenkegezh** b. Reñver trenkennoù ezvevennet dre an troazh.
- acinus** ◇ **acinus** ◇ **hogan** g. -où & **hogin, akinuz** g. Kavenn bellennek, elfenn en ul luniad blokadek (gwagrennoù, skevent).
- acineux** ◇ **acinous** ◇ **hoginek** aa. E stumm ur blokad.
- acmé, période d'état** ◇ **acme, climax** ◇ **renn** g., **bog** b., **bogvezh** b. E dedro ur c'hleñved, prantad ma vez an azonoù en o c'hreñvañ.
- acné** ◇ **acne** ◇ **akne** b. Anvad rumm anaezadoù diseurt, dezho da zoareenn voutin anafoù kroc'hen balirek o sezañ war an dremm peurliesañ.
- acne conglobata** ◇ **acne conglobata** ◇ **akne gengronnet** Akne ar gour yaouank o sezañ en askil, er c'hazelioù, e rannbarzhioù ar varlenn hag ar peñsoù, anezhi tosennoù burbunnek hag ozvennoù a 'n ezkcroc'hen hag a 'n donenn o taskantañ e rezh ribouloù dindan ar c'hroc'hen hag o lezel war o lerc'h kleizennoù ledan ha balirek.
- acné juvénile polymorphe** ◇ **acne vulgaris** ◇ **akne yaouerel liesstumm, akne voutin** Akne an dud yaouank, o naouiñ dre ar soavred, korrgistoù ha komedonoù.
- acné nécrotique** ◇ **acne necrotica miliaris** ◇ **akne varvennek** Akne an tal hag ar brigenn oc'h emdreiñ a-frapadoù dre grugennoù o vont da vurbuennoù ha da droukennoù azgell hag o lezel kleizennoù war o lerc'h.
- acné rosacée** ◇ **acne rosacea** ◇ **akne livrin** Furm akne krugennek ha burbunnek o tizhout ar c'hroc'henoù sec'h, eritrozek ha bourbonek, dreist holl gant ar merc'hed goude 40 vloaz.
- acnitis** ◇ **acne agminata** ◇ **aknitiz** b. Anaez kroc'hen dibaot, anezhañ un dispuilhad krugennoù melen-gell war lodenn greiz an dremm, sellet evel ur furm a duberkulid krugennmarvennek.
- acoumétrie, phonométrie** ◇ **acoumetry** ◇ **klevandalañ** Imbourc'h ar c'hleved diwar-bouez amprouennoù diseurt : dre ar vouezh, dre araez ardivinkoù evel an tonreizher, an akoumetr, an aodiometr.

acouphène ◇ **tinnitus** ◇ **boudinell** b. Kleveraezadenn n'emañ ket he orin er-maez eus ar benvegad kleved (fraoñvadenn, sutadenn, titirin).

acoustique ◇ **acoustics, acoustical** ◇ **1 Stenoniezh** b. **2 stenoniell** aa. **3 klevva** g. **4 Klevvaouriezh** b. **5 klevvael** aa. **6 klevvaek** aa. **7 klevvaegezh** b. 1 Skourr ar Fizik o studiañ an anadennoù steneel. 2 A-zave d'ar Stenoniezh. 3 Nep lec'hienn (adeilad, h.a.) desellet diouzh savboent treled ar sten enni. 4 Kalvezouriezh adeiladel he amkan reoliñ treled ar sten er savadurioù. 5 A-zave d'ar c'hlevvaou. 6 Mat evit a sell treled ar sten. 7 Perzhded ul lec'hienn evit a sell treled ar sten.

acquérir, acquis

- *acquérir l'immunité* amparañ an hangae
- *acquis / inné* arzeuat / enganet
- *déformation congénitale ou acquise* distummadur ganediged pe arzeuat
- *rétrécissement aortique acquis* isvoll arzeuat an aortenn
- *tumeur malformative ou acquise* yoc'henn gamm-neuziad pe arzeuat
- *vitesse acquise* tizh gounezet.

acrinie ◇ **acrinia** ◇ **anvorc'h** g. Ezvezañs ar borc'hañ.

acrocéphalie ◇ **acrocephaly** ◇ **tourbennegezh** b. Kammneuziad a'r c'hloppenn a zo hiraet a-grec'h, dezhañ stumm un dorzh sukr.

acrocyanose ◇ **acrocyanosis** ◇ **dulaz** g. **ar bleñchoù, akrokianoz** g. Dulaz an eizhaennoù o c'hoarvezout da geñver klañvadurioù diseurt.

acrocyanose essentielle, acro-asphyxie, syndrome de Crocq et Cassirer ◇ **acrocyanosis** ◇ **dulaz** g. **hennadek ar bleñchoù, azoniad** g. **Crocq ha Cassirer** Klañvadur o naouiñ dre ar gourwad dassavel hag ar c'hwezusvorc'h en eizhaennoù (treid ha daouarn dreist holl), o teraouiñ er vugeliezh, o vuiaat er gaezouregezh hag o tistav en oadouriezh; anezhañ un antant korrwazhiedel na anavezet ket an arbenn anezhañ.

acrodermatite ◇ **acrodermatitis** ◇ **akrodermatit** Kroc'henfo ar bleñchoù.

acrodynie ◇ **acrodynia, pink disease** ◇ **akrodiniezh** b. Kleñved ar vugale etre 6 miz hag 8 vloaz, o naouiñ dre goeñvenn yen, mouest ha dulazek an daouarn, an treid hag a-wechoù ar fas, ha dre strafuilhoù bredel (asikted, arfleu), kalongwazhiedel (uswask, kalonustead) ha mezhurel (fallezh); parañ a ra peurvuiañ hep arlenad; dianav eo an arbenn anezhañ.

acrodysplasie ◇ **acrodysplasia** ◇ **akrodisplaziezh** b. Miwe an eskern hag ar migern o tizhout an eizhaennoù, an daouarn pergen.

akrokératose ◇ **akrokeratosis** ◇ **akrokeratoz** g. Naoued kroc'hen an eizhaennoù, o naouiñ dre uswe kornhaen an ezkroc'hen.

acromégalie ◇ **acromegaly** ◇ **keurvleñchegezh** b. Usteñv anganediged eizhaennoù an izili, ar fri, an divskouarn hag an teod, e dalc'h un adenom eozinofil e tolbezenn araok ar c'hougorfenn; kevret e stader strafuilhoù kennevidel (diabet, gwadusvec'h fosfor, troazhusvec'h kalkiom), hormonel (skorted ar gonadoù) hag hollek (uswask talmerel).

acromélgie ◇ **acromelalia** ◇ **bleñchost** b. Azoniad o c'hoarvezout a laurioù frapadek en eizhaennoù an izili.

acromélique ◇ **acromelic** ◇ **bleñchel, eizhaennel** aa. A-zave da eizhaennoù an izili.

acromicrie ◇ **acromicria** ◇ **korrvleñchegezh** b. Isteñv ar penn hag eizhaennoù an izili, keveneb ar geurvleñchegezh; evit aozerion 'zo ne ve ket eus an azoniad-se.

acroparesthésie ◇ **acroparaesthesia** ◇ **kammeraez** g. **ar bleñchoù** Bavedigezh ha kemenerion en daouarn diwar amwask un nervenn (azoniad an nervenn greizer) pe un dalmerenn.

acropathie ◇ **acropathy** ◇ **bleñchanaez** g. Anvad rumm anaezioù an eizhaennoù.

acropathie ulcéromutilante, neuro-acropathie, neuropathie radulaire sensitive héréditaire ◇ **Denny-Brown's syndrome** ◇ **nervangreizhegezh** b. **an eizhaennoù** Azoniad hêrezhel o c'hoarvezout eus anafoù teñvel kroc'hen-eskern o tizhout eizhaennoù an izili traoñ.

acrosome ◇ **acrosome** ◇ **akrozom** g. Rann araok ar spergellig, o kabellañ ar graoñell anezhi.

acrosyndrome ◇ **peripheral vascular disease** ◇ **bleñchazoniad** g., **gwazhiedanaez trobarzhel** Anvad rumm strafuilhoù gwazhiedel an eizhaennoù.

acte

- *acte chirurgical* gwezh g. surjianeel, gwezhiañ surjianeel
- *acte compulsif* real g. mac'hennet
- *acte sexuel* gread g. revel
- *effectuer un acte, opérer* gwezhiañ

actif

- *actif à faibles doses* gweredus a zoenoù bihan
- *anticorps spécifiquement actifs sur un antigène déterminé* antikorfou gwezhus ent spesadel ouzh un antigen lavaret
- *chargés de principes actifs* karget a wezhuzennoù
- *concentrations actives* bec'hiou gweredus
- *congestion active* gourwad oberiat
- *doué de mouvements actifs* gantañ an arc'hwel fiñval
- *substances vaso-actives* danvezzennoù gwazhiedwezhus
- *tensio-actif* gorrewwezhus, gorrewwezh aa. & g. -ioù (sl. **action, activation, activité**).

actine ◇ **actin** ◇ **aktin** g. Protein parzhiat er c'haerwianoù.

actinique ◇ **actinic** ◇ **aktinek** aa. A-zave d'al luc'hskinoù a zo dezho ur gwered kimiek.

actinite, actinodermatose ◇ **actinic dermatitis** ◇ **aktinit** g., **kroc'henanaez** g. **luc'hel** Anvad rumm an anaezioù kroc'hen (dermatit pe dermatoz) diwar wered ar skinoù luc'h.

actinologie ◇ **actinology** ◇ **luc'houriezh** b. Studi ar skinoù luc'h hag o gweredoù bevedel.

actinométrie ◇ **actinometry** ◇ **aktinometriezh** b. Muzul skinread an heol.

actinomycose ◇ **actinomycosis** ◇ **aktinomikoz** g. Kleñved dec'hanet gant neradur bakteri 'zo eus kevrennad an Aktinomiket.

actinothérapie, photothérapie ◇ **actinotherapy** ◇ **luc'hgurañ** Anvad rumm an hentennoù mezegañ dre arloañ skinoù ouzh ar c'hroc'hen; er pleustr e verk an termen arver ar skinoù luc'h dreistmouk ha danruz.

action dynamique spécifique des aliments ◇ **food specific dynamic action** ◇ **gwered** g. **dialuskel spesadel ar bouedoù** Kresk an dispign gremm a-geñver strizh gant natur ar maguzennoù euvret.

action

- *action analgésique* dic'hostañ • *action antiplasmine* plasmindolc'hañ • *action excessive de la plasmine* rewered ar plasmin
- *action simultanée de deux médicaments* kenwered daou lia • *émétique à mécanisme d'action centrale* c'hweluzenn greizweredus
- *le muscle qui exerce l'action principale* ar gignenn o ren ar gwered pennañ • *sous l'action des enzymes* dre wered an enzimoù
- *toxine traitée par l'action de la chaleur* toksin arwered'het dre ar wrez.

activateur

- *les activateurs du plasminogène* blivaerioù ar plasminogen.

activation ◇ **activation** ◇ **blivaat** 1 Muiat perzhioù ur c'horf gant pe hep treuzfurmiñ kimiek, dre zelanvad parennoù diseurt : treluskerioù, blivaerioù, skinoù. 2 Divleinekaat ar wienn gaher kalon dre he broudañ, e se dec'han ul lec'hienn dredanleiel en he gorre hag ur c'hemm barr dinoadus gant ar c'halonvarrwezer.

activation d'un œuf, activation ovulaire ◇ **ovular activation** ◇ **blivaat ar vigellig** Terriñ anniñv kennevidel ar vi gwerc'h dre araезioù fizikel pe kimiek evit ober dezhañ deraouiñ diorren kuit a speriadur.

activation

- *activation d'une partie du cœur* blivaerezh un tared eus ar galon • *activation ventriculaire* blivaat ar c'hofig • *énergie d'activation* gremm blivaat • *anomalie de l'activation ventriculaire* gwariadenn e blivaerezh ar c'hofig • *inhiber l'activation du plasminogène* skoilhañ blivaerezh ar plasminogen • *les activateurs du plasminogène* blivaerioù ar plasminogen • *une fréquence anormalement rapide des activations auriculaires* un ustalm anreol eus ar blivadoù a-gentez.

activité agrégante plaquettaire ◇ **platelet aggregating activity** ◇ **pladandazusted** b. Perzh danvezzennoù 'zo dilaosket gant ar pladanoù diwar wered kentrigennoù diseurt hag en araез da zec'han d'o zro dzadadur an arlugaд pladanoù.

activité

- *activité électrique auriculaire* gwerederezh tredanel ar c'hentez • *activité contre l'antigène* gweredusted ouzh an antigen • *activités courantes des handicapés* oberiezh pemdeziek an nammidi • *activité d'un élément radioactif* oberiegezh un elfenn skinoberiek
- *activité de palpation et de recherche incessante dans les états confusionnels* oberiezh teuta hag ardapout dizehan er stadoù arluzegezh • *activité de synthèse protéique de la cellule* enaozerezh ar protid gant ar gellig • *activité des oreillettes* gwerederezh ar c'hentezioù • *activité électroencéphalographique* gwerederezh empennvarrvezadel • *activité exercée par certaines substances* perzh danvezzennoù 'zo • *activité immunitaire excessive ou inappropriée* gwerederezh hangaeel reñverek pe diazas • *activité mécanique ventriculaire gauche* gwerederezh treloc'hel ar c'hofig kleiz • *activité motrice involontaire* fiñverezh andiarvann
- *activité pharmacologique* gwezhusted liael • *activité toxique* pistrierezh • *agissant en inhibant l'activité de la plasmine* o werediñ dre skoilhañ gwezhusted ar plasmin • *coefficient d'activité* gwezhiaader gweredegezh • *dépourvu d'activité enzymatique* hep perzh enzim • *diminution de l'activité d'une source radioactive* leiadur gwerediñ ur vammenn skinoberiek • *le barrage est un arrêt brusque de l'activité chez le psychotique* ar c'haelad zo un astal trumm a 'n niñvañ gant ar psikozeion • *propagation de l'activité électrique* trelad ar gwerederezh tredanel • *période d'activité génitale* hoal ganadel • *radioactivité* skinoberiegezh.

actographe ◇ **actograph** ◇ **fiñvdresenner** g. **-ioù** Ardivink o lerc'hwezañ ar fiñvoù, da skouer ar re a ra un den dre e gousk.

acuité ◇ **acuteness, acuity** ◇ **1 skiltrez** g. **2 lemmded** b. **3 lemmded** **4 beriusted** b. 1 Ar bezañ skiltr, eleze uheldalm, evit ur sten. 2 Galloud digemmañ al lagad pe ar skouarn. 3 A-zivout ur c'hleñved, bezañ trumm ha berbad. 4 A-zivout ul laur, bezañ kreñv ha lec'hiek.

acuité auditive ◇ **auditory acuity** ◇ **lemmded kleved** Ar c'hemm stenwask bihanañ merzhadus dewerzhet e dekibeloù.

acuité visuelle ◇ **visual acuity** ◇ **lemmded weled** Galloud dezgavaelañ gant al lagad, anvet c'hoazh gwelnaд ar stummoù; anv a reer ivez eus gwelnaд al luc'hioù hag eus gwelnaд al livioù.

acuité visuelle : échelle d'~ ◇ **visual acuity test type** ◇ **skeul broudiñ al lemmded weled** Prouad diwar renkennadoù gwelrizennoù a vent argreskus evit muzuliañ al lemmded weled; ul lagad 10/10 lemmded a c'hell skarat div elfenn en devez warno ur gavael ur munud.

acupuncteur ◇ **acupunctur** ◇ **nadozwaner** g. **-ion** Embregour an nadozwanerezh.

acupuncture ◇ **acupuncture** ◇ **nadozwanañ, nadozwanerezh** g. Hentenn deznaouiñ ha yac'haat a orin sinaat, anezhi naouaat un teskad poentoù war ar c'hroc'hen ha sankañ enno nadozioù metal moan ha leun.

adactylie ◇ **adactylia** ◇ **anviz** g. Ezvezañs c'hanedigel un pe lies biz.

adamantinome, ameloblastome ◇ **adamantinoma, ameloblastoma** ◇ **adamantinom** g. Yoc'henn an aven deveret diouzh dilerc'hioù ar gwiadoù dantparer, nes he luniad da wiadoù an dent bonan, rizhellel pe oadourel, ganti un dedro yud a-wechoù (epiteliom adamantel).

adamantoblastes, améloblastes ◇ **adamantoblasts, ameloblasts** ◇ **adamantoblast** s. Kelligoù epitelel o vorc'hañ ar prigwer.

Adams-Stokes : syndrome d'~ ◇ **Adams-Stokes syndrome** ◇ **azoniad** g. **Adams-Stokes** Darvoud nervel (trolern, fallaenn, barrad droukfell, marv trumm) diwar ur grezvarr eus ar c'halonistead pad.

adaptation ◇ **adaptation** ◇ **argeskedañ** Perzh al lagad da azasaat diouzh ar goulaouder.

adaptation à la lumière ◇ **light adaptation** ◇ **argeskedañ diouzh ar gouloù** Gougizidigezh al luc'hsae o naouiñ ouzh skedoù dreist 10 nit (gweled fotopek pe deizel).

adaptation à l'obscurité ◇ **dark adaptation** ◇ **argeskedañ diouzh an teñval** Gourc'hizidigezh al luc'hsae o naouiñ gorrek ouzh skedoù dinan 10⁻³ nit (gweled skotopek pe nozel).

adaptation colorée ◇ **colo(u)r adaptation** ◇ **argeflivañ** Daskemmad ar gweled dre wered ul luc'h livek (luc'h argeflivañ); goude argeflivañ diouzh ar gwer, e hañval ar ruz bezañ arvoukoc'h ha bec'hietoc'h eget evit ul lagad anargefliv.

adaptation bactérienne ◇ **bacterial adaptation** ◇ **azasaat ar bakteri** Daskemmad gant ar bakteri a-zalc'h ouzh daskemmadoù ar metoù.

adaptation : maladies de l'~ ◇ **adaptation diseases** ◇ **kleñvedoù an emazasaat** Erzerc'hadoù kleñvedel e dianlen strafuilh en erwezhoù emazasaat : pe skorted an erwez arfroù ha gwashaat ar bleuz diwar skorted ar reizhiad gougorfenn-kaenus-lounezhenn, pe reñver an erwez da heul keuziadoù hir pe arreet o tevoudañ naouedoù diseurt (angreizh koazhadel, trodalmerennfo ozvennek, remm, lounezhfo, uswask) diwar uc'harc'hwel ar reizhiad.

adaptation : syndrome d'~, syndrome de Selye ◇ **adaptation syndrome** ◇ **azoniad** g. **emazasaat** Erwezhoù anspesadel ar bevedeg ouzh ur c'heuziad (daraez, regas, oksigenisvec'h, pore, pistriadur, skinata, h.a.); tri lankad a zeskriavas Selye : 1) an erwez arfroù, ouzh e ober ar bleuz hag an erwezhoù enepbleuz kentañ, 2) ar stad herzel, hiroc'h, ma striv ar bevedeg da emazasaat dre greñvaat e zifennoù, 3) ar stad diviañ oc'h echuiñ gant ar marv.

adaptométrie ◇ **adaptometry** ◇ **argeskedventerezh** Muzul eus kizidigezh al luc'hsae dre studiañ he argeskedusted diouzh an teñval; an hent eo da imboure'hiñ ar gweled amheolel; embreget e vez diwar-bouez an argeskedventer pe adaptometr, ardivink o lakaat da argemmañ didorr ul lijorenn luc'hus unvan.

adapt-

• *adaptation au milieu* emazasadur diouzh ar metoù • *s'adapter au milieu* emazasaat diouzh ar metoù • *adaptomètre* argeskedventer • *œil non adapté à la couleur* lagad anargefliv • *possibilités d'adaptation* emazasausted.

addiction ◇ **addiction** ◇ **estoue** g. Kaezhiadezh, eleze sujadur d'ur gwezher kimiek, o naouiñ dre ar youl distourmus d'e gemer e-maez a bep amkan mezegel; un teskad termenou damheñvelster a arverer hervez natur ar gwezher ebarzhet er bevedeg : *drammgaezhiadezh, drammeestoue, gwezherestoue, liaestoue, kimiestoue* (sl. *accoutumance, assuétude, chimiodépendance, dépendance, pharmaco-dépendance, toxicomanie*); notomp e vez astennet arver *addiction* da sujadurioù all, evel ar c'hoari, ar greadoù revel, h.a.

addictologie ◇ **addictology** ◇ **estoueoriezh** b. Studi ar realoù estoue.

addictologue ◇ **addictologist** ◇ **estoueor** Arbennigour war ar realoù estoue.

additif alimentaire ◇ **food additive** ◇ **arodad** g. **boued** Danvezenn ouzhpennet d'ur boued, a gementadoù bihan peurliesañ, da aesaat e viridigezh, da stabilaat pe da wellaat e berzhioù, e wiadezh, e saour, e neuz pe da aesaat ar brientidigezh anezhañ; diforc'hiñ a reer an arodadoù diouzh ar c'hentaozadù, danvezet a gementadoù brasoc'h hag o talvout da amparañ ar boued e unan.

Addison : maladie d'~, maladie bronzée ◇ **Addison's disease** ◇ **kleñved** g. **Addison** Skorted henek an uslounezhennou, unanhangaeel peurliesañ, naouus dre an asikted don, an iswask talmerel, al loanost, strafuilhoù koazhadel, livrezh arem ar c'hroc'hen.

addisonien ◇ **addisonian** ◇ **1 3 adisonek** aa. **2 adisoneg** g. **-eion** 1 Gant kleñved Addison. 2 Gouziviad kleñved Addison. 3 A-zave da gleñved Addison.

adénectomie ◇ **adenectomy** ◇ **1 gwagrennezvenañ 2 gwerblennezvenañ 3 struzhennezvenañ** 1 Dilemel surjaniel ur wagrenn (sl. *glande*). 2 Dilemel surjaniel ur werblenn (sl. *ganglion lymphatique*). 3 dilemel surjaniel ar struzhennoù (huegoù ar c'hargadenn) (sl. *végétations adénoïdes*).

adénite, lymphadénite ◇ **lymphadenitis** ◇ **gwerblennfo** g. Tanijenn lemm, goulemm pe henek ar gwerblennou.

adénocarcinome ◇ **adenocarcinoma** ◇ **adenokarkinom** g. Hanwe evodet diouzh epitelienn ur wagrenn.

adénofibrome ◇ **adenofibroma** ◇ **adenofibrom** g. Yoc'henn guñv diwar barenkim ur wagrenn, o struzhañ enni ar gwiad kenglenel entremezel war un dro gant ar gwiad epitelel.

adénogramme ◇ **lymph node differential cell count** ◇ **eriñv** g. **gwerblennel, adenogramm** g. Niveridigezh ar c'helligoù bezant er sug ezwanet eus ur werblenn.

adénoïde ◇ **adenoid** ◇ **gwerblennel** aa. A-zave da wiad ar gwerblennoù.

adénoïde : **végétations** ~s ◇ **adenoids** ◇ **struzhennoù** l. (b.) **gwerblennel** Ustev ar gwiad gwerblennel a ya d'ober huegoù ar c'hargadenn.

adénoïdectomie ◇ **adenoidectomy** ◇ **struzhennezevañ** Dilemel surjanel ar struzhennoù gwerblennel.

adénoïdien ◇ **adenoid** ◇ **1 struzhennek** aa. **2 struzhennel** aa. 1 (Bugel) gant struzhennoù gwerblennel. 2 A-zave d'ar struzhennoù gwerblennel.

adénoïdien : **faciès** ~ ◇ **adenoid facies** ◇ **enebrezh** g. **struzhennel** Neuz dremm ar vugale struzhennek : da heul stankadur o fric'hargadenn emañ distummet o fri hag e chom damziger o genoù.

adénoïdisme ◇ **adenoidism** ◇ **struzhennegezh** b. Erzerc'hadoù lec'hel ha strafuilhoù hollek e dianlen ar struzhennoù.

adénoïdite ◇ **adenoiditis** ◇ **struzhenngo** g. Tanijenn ar struzhennoù.

adénomatose ◇ **adenomatosis** ◇ **adenomatoz** g. Uswe e rezh adenomou liesnozelek evodet diouzh un arwiskad pe diouzh parenkim ur wagrenn.

adénome ◇ **adenoma** ◇ **adenom** g. Yoc'henn epitelem kuñv evodet diouzh parenkim ur wagrenn, sk. : adenom ar raksavenn.

adénome périurétral, hypertrophie prostatique ◇ **prostatic hypertrophy** ◇ **adenom tro-gantroazh, usvent** g. **ar raksavenn** Yoc'henn guñv (adenofibromiom) o tinodiñ en dro d'ar c'han troazh etre gouzoug ar c'hwelzhegell ha tumell ar sper; ur skoilh eo ouzh an deziolañ.

adénome thyroïdien toxique, adénome thyrotoxique ◇ **struma nodosa** ◇ **adenom pistriek ar skoedenn, pennsac'h g. nozelek** Yoc'henn epitelem kuñv eus ar skoedenn e rezh un nozelenn hevon, borc'het ganti hormonou skoedel o tevoudañ an tireotoksikoz pa 'z eont reñverek (sl. *nodule chaud, nodule froid, goitre multinodulaire*).

adénomectomie ◇ **adenomectomy** ◇ **adenomezveañ** Dilemel surjanel un adenom.

adénoopathie ◇ **lymphadenopathy** ◇ **c'hwarrenn** b. Anvad roet, kuit a zave d'un arbenn, d'ar gwerblennoù koeñvet.

adénoophlegmon ◇ **adenophlegmon** ◇ **gwerblennvorfer** g. Gwerblennfo linus, anezhañ kevret ur gor engwerblennel hag ur gor trowerblennel.

adénosarcome ◇ **adenosarcoma** ◇ **adenosarkom** g. Yoc'henn yud a rizh sarkomatus evodet diouzh gwiad kenglenel ur wagrenn.

adénose ◇ **adenosis** ◇ **gwerblennanaez** g. Anvad rumm evit anaezioù henek ar gwerblennoù (sl. *adénomatose*).

adhérence ◇ **adhesion** ◇ **glenell** b. Kempegad ganedigel pe kleizennel etre daou barzh organ kefin disrann ent vonan.

adhésion des plaquettes ◇ **platelet adhesion** ◇ **glenañ ar pladanou** A-zivout ar pladanou, pegan *in vitro* ouzh speurennoù gwer pe *in vivo* ouzh gwiennou ar c'hollagen pa vez freged ar gwazhied — prantad deroù ar gwadkæañ kentael.

adhésion : **travail d'~** ◇ **adhesion work** ◇ **gremm** g. **distekiñ, pegusted** b. Gremm ret da zistekiñ div liñvenn, pe ul liñvenn hag ur sonnenn, diwar ur gorread 1 cm² (ent ventawouriel, hevelep mentad zo ur gremmder gorreel, e atalad MT⁻²).

adhésiotomie ◇ **adhesiotomy** ◇ **glenellenbeañ** Gwezh surjanel evit loezañ ur c'hlenell.

adhérence, adhésion

- *adhérant fortement au stroma cornéen* glenet start ouzh stroma ar gornsae
- *adhérence vicieuse de la langue* glenadur siek an teod
- *adhérences intra-articulaires* glenelloù enarzel
- *adhérer à la surface d'un solide* glenañ ouzh gorre ur sonnenn
- *adhérer aux hématies* glenañ ouzh an hemati
- *adhésion des plaquettes au collagène* glenadur ar pladanou ouzh ar c'hollagen
- *former des adhérences* glenellañ
- *adhésivité des plaquettes* glenusted ar pladanou
- *création d'adhérences destinées à améliorer la vascularisation du myocarde* amparañ glenelloù war-benn gwellaat gwazhiedadur ar c'haer kalon
- *soudure accidentelle des lèvres sans adhérence aux mâchoires* soutadur a-zarvoud an divweuz hep glenadur ouzh an divaven.

adiadococinésie ◇ **adiadochokinesia** ◇ **andasfiñv** g. Koll ar galloud da ren fiñvoù monedone, evel jestr ar merc'hodenner, ar c'hambliañ, h.a.

adiastolie ◇ **adiastole** ◇ **adiastol** g. Skorted kalon dre isleuniadur ar c'hofigoù, diwar an amgalonnenno amwaskus pe naouedoù ar c'haer kalon (fibroz, amiloz, hemokromatoz).

adiastolique ◇ **adiastolic** ◇ **adiastolek** aa. Gant pe a-zave d'an adiaistol.

adipocire, gras de cadavre ◇ **adipocere** ◇ **druzkoar** g., **kelangoar** g. Danvez lardek o padout pell ouzh ar breinañ, o tisoc'h diouzh dourrannadur behin ar c'helan.

adipocytes ◇ **adipocytes** ◇ **adipokit** s., **druzkelligoù** l. (b.) Kelligoù kenglenel, digenvet pe parzhiat er gwiad behinel, enno un pe lies takenn druzoni, dezho ur roll en enozañ al lipid, ar c'hadav hag an dilaosk anezho trema ar gwad.

adipogène ◇ **lipogenic** ◇ **behinbar** aa. En araez da amparañ behin pe gwiad behinel.

adipogénèse, adipogénie, lipogénèse ◇ **adipogenesis, lipogenesis** ◇ **behinbarañ** Teskad an argerzhioù o tisoc'h gant amparadur ar behin.

adipolyse, lipolyse ◇ **adipolysis, lipolysis** ◇ **behinloezañ** Dourrannañ an druzoni, o tec'han steuziadur ar behin.

adipopexie ◇ **lipopexia, adipopexia** ◇ **behinlenañ** Teskad an argerzhioù o tisoc'h gant yoc'hadur an druzoni er bevedeg.

adipopexique, lipopexique ◇ **adipopexic** ◇ **1 behinlenat** aa. **2 behinlenadel** aa. 1 Gant an arc'hwel behinlenañ. 2 A-zave d'ar behinlenañ.

adiposalgie, panniculagie ◇ **adiposalgia** ◇ **behinost** b. Gwiridigezh emdarzh pe dec'hanet ar gwiad behinel endan-groc'hen.

adipose, adiposité ◇ **adiposis** ◇ **behinegezh** b. Reñver behin bonan pe gleñvedel; pa vez kleñvedel, e vez pe lec'hiek (usvehin lec'hiek, lipomou), pe hollek (borrder).

adiposogénital : syndrome (hypophysaire) ~, syndrome de Babinski-Frölich ◇ **adiposogenital dystrophy** ◇ **azoniad g. behinganadel, mideñv g. behinganadel, azoniad Babinski-Frölich** Naoued ar bugel, anezhañ kevreted ur borrder muiek hag ur mideñv ganadel (paouez diorren organoù ar genel) diwar un anaf eus ar c'hougorfenn.

adipsie ◇ **adipsia** ◇ **ansec'hed** g. Tued bonan gant tud 'zo a c'hell chom devezhioù pe sizhunvezhioù hep kaout ezhomm da evañ.

adjoint, adjonct-

• *par adjonction de chlore à dre* azdodiñ klor ouzh • *prothèse dentaire adjointe, amovible ou mobile* dentosod lamadus pe heloc'h.

adjuvant ◇ **adjuvant** ◇ **1 harpat** aa. **2 gwezher g. -ioù harpañ, mezegadur g. harpañ 3 harper g. -ioù** 1 O skoazellañ, o kreñvaat, o klokaat. 2 Yac'hadur diounezet da greñvaat pe da glokaat ar mezegadur pennañ. 3 Aozad diounezet war un dro gant un antigen da vuiaat an erwezhiad hangaeel outañ.

admettre, admiss-

• *admettre comme pensionnaire d'un établissement médical ou social* herberc'hiañ • *admission (en hôpital, etc.)* entiañ, darbenn • *admission d'urgence* darbenn diwar zifrae, darbenn difrae, darbenn trummat • *bureau des admissions* darbennva • *service d'admission* gwazrann darbenn.

administr-

• *administrable* diounezadus • *administration de drogues* diounit drammoù • *administration orale ou parentérale* diounit dre euvriñ pe dre sankañ • *administrer par voie buccale* diounit dre ar genoù/dre euvriñ/genaouel • *administrer par voie intraveineuse /veineuse* diounit dre ar wazhienn/(ent) engwazhiennel (ent w-) gwazhiennel • *administrer par voie sous-cutanée/en sous-cutanée* diounit endangroc'hen/(ent) dangroc'henel • *administrer par voie intramusculaire/en intramusculaire* diounit dre ar gigenñ/enkaherel/(ent) kaherel • *administrer par voie rectale* diounit dre ar youlc'h/(ent) youlc'hel • *antiseptique administré par voie buccale* dilester diounezet dre ar genoù • *dans les conditions correctes d'administration* hervez ar reolennoù diounit erskrivet • *une forme telle que le médicament puisse être administré* ur furm eus al lia azas diouzh an diounit.

adolescence ◇ **adolescence** ◇ **krennoad g. krennoadvezh** g. Rann eus an hoali etre ar vugeliezh hag an oadouriezh, kempred d'ar gaezouregezh.

adolescent ◇ **adolescent** ◇ **krennoadour g. -ez, krennard g. -enn, -ez** Paotr, plac'h yaouank en o c'hrennoad.

adopt-

• *immunisation adoptive* hangaeñ herberc'hiadel.

adouc-

• *préparation appliquée sur la peau comme adoucissant* angevezh a arloer war ar c'hroc'hen evel distanzenn.

adrénaline ◇ **epinephrine, adrenaline** ◇ **adrenalin** g. Hormon borc'het gant ar vezonuslouezhenn, hanterad kimiek an nervennoù simpatek goudekangrenn.

adrénergique ◇ **adrenergic** ◇ **1 adrenwerc'her** aa. **2 adrenwerc'her** g. 1 A-zave da zilaosk pe da wered an adrenalin pe o werediñ evel an adrenalin. 2 Danvezenn adrenwerc'her.

adrénolytique ◇ **adrenolytic, adrenergic blocking agent** ◇ **1 adrendolc'her** aa. **2 adrendolc'her g., -ioù** 1 En araez da leiaat pe da lemel gwered an adrenalin war ar buzerioù α ha β . 2 Danvezenn adrendolc'her (sl. *alphabloquant, bêtabloquant*).

adrénopause ◇ **adrenopause** ◇ **kaenbaouez** g. Difonn arc'hwelioù ar gaenuslouezhenn o c'hoarvezout peurliesañ goude an oad a 50 vloaz, o tizhout dreist holl borc'hadur an hormonoù androgenek.

adrenoprive ◇ **adrenoprival** ◇ **ec'huslouezh** aa. A-zave da skorted an uslouezhenn.

adsorbant ◇ **adsorbent** ◇ **1 amsunus** aa. **2 amsunuzenn** b. 1 Gant ar perzh amsunañ. 2 Danvezenn splu pe hueek (glaou koad, ludu eskern, silika, alumini) dezhi ur barr amsunañ bras e-keñver un arvez aezhel (arveret evit an dizaezhañ) pe un arvez liñvel (evit amsunerezh diuzel korfoù war zileizh).

adsorption ◇ **adsorption** ◇ **amsunañ** 1 Kemm etre bec'hioù ur gedaozenn e gwiskadoù bas ha don un dileizhenn; muiel ez adanver an amsunañ pa vez brasoc'h ar bec'h a-vas eget ar bec'h azon, leiel en dro c'hin. 2 Lenadur, hogos bepred eiltroüs, eus ur gedaozenn (molekul, ion, rannigoù) ouzh gorre ur sonnenn (amsunuzenn), kimiek (dre gediañ) pe fizikel (dre nerzhoù Van der Waals).

adsorber, adsorption

• *adsorber des protéines antigéniques* amsunañ proteinoù antigenek • *chromatographie d'adsorption* kromatografiñ dre amsunañ

adulte

• *fibroblastes adultes et matures* fibroblast oadour hag azv.

adynamie ◇ **adynamia** ◇ **angremm** g. Ogvez nerverl ha kaheerel devoudet gant kleñvedoù 'zo.

adynamie épisodique héréditaire ◇ **adynamia episodica hereditaria** ◇ **angremm resmiadek hêrezhel** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hel, o teraouiñ er vugeliezh, azonet gant barradoù seizi hag ar gwadusvec'h kaliom.

aérobain ◇ **kouronk** g. **eonek** Hentenn gouronkañ en arver er c'hreizennoù morgur pe havgur, anezhi flistrañ aer dre doullou diwar strad ar gibell war-benn merata ar gouziaviad.

aérobie ◇ **aerobic** ◇ **aerat** aa., **aervevat** aa., **aerad** g. **-ed**, **aervevad** g. **-ed** (Garveg) Na c'hell tiñvañ nemet e diraez an oksigen (aerat/d ret), pe a c'hell tiñvañ e diraez koulz hag e-maez diraez an oksigen (aerat/d diret).

aérobiose ◇ **aerobiosis** ◇ **aerveved** g., **aervevadezh** b. Amveziadoù ret d'ar beved e diraez an oksigen.

aérocolie ◇ **aerocolia** ◇ **kolonaezhad** g. Hogennad aezhenn er c'holon, diwar ur reformiñ anezhi pe ur skoilh ouzh he c'harzhañ.

aérocontaminant ◇ **air pollutant** ◇ **aersaotremm** b. Nep korf eufennek en arc'hoal en aer en araez da zec'han direizhoù bronkez ha/pe skevent.

aérodontalgie ◇ **aerodontalgia** ◇ **aerzantost** b. Laur dent diwar argemm an aerwask (sl. *barodontalgie*).

aérombolisme, **aéremie** ◇ **air embolism** ◇ **aerennfroù** g., **gwadaezhad** g. Argerzh kleñvedel diwar ebarzhidigezh pe diwanidigezh klogor aezhenn en amred ar gwad (sl. *caissons : maladie des ~*).

aérogastrie ◇ **aerogastria** ◇ **kreuzaezhad** g. Bezañs reñverek aezhenn er stomok.

aérogène ◇ **aerogen** ◇ **aerien** aa. O tont eus an aer, sk. : *tredizhad aerien ar skevent gant an dorzhellegezh*.

aérophagie ◇ **aerophagia** ◇ **aerlonk** g. Lonkadur aer reñverek.

aérophobie ◇ **aerophobia** ◇ **avelgaz** g. Aon kleñvedel rak fiñvoù an aer, azon boas ar gonnar.

aérosol ◇ **aerosol** ◇ **aerosol** aa. **-ioù** Reizhiad o c'hoarvezout eus rannigoù liñvel pe sonnel en arc'hoal stabil en ec'honenn un aezhenn; kemm a lakaer etre an aerosolioù hag an difruadoù dre vent ar rannigoù, ar re-mañ o vezañ kalz bihanoc'h gant an aerosolioù, ha da heul dre zerez o stabilded.

aérosolthérapie ◇ **aerosoltherapy** ◇ **aerosolgurañ** Diounit liaoù 'zo e furm aerosol da vezañ dewentet hag, e se, ebarzhet don er forzhioù analañ.

aér-

• *cavité aérienne de la face* kavenn aereus an dremm, aergavenn eus an dremm • *collection aérienne* hogennad aezhel • *formation cavitaire aérique* furmadur kavennek aerleun • *partie supérieure, exclusivement aérienne, du pharynx* lodenn grec'h ar c'hargadenn, aerforzhel strizh • *voies aériennes périphériques* aerforzhioù trobarzhel • *voies aériennes supérieures* aerforzhioù uhelañ.

affaissement

• *affaissement de la voûte plantaire* flakadur ar volz troad • *affaissement de la voûte métatarsienne* flakadur bolz ar c'hreiz-troad.

affect ◇ **affect** ◇ **kantaezad** g. Unan eus kealioù pennañ ar Vredoniezh : nep stad a boan pe a blijadur, spis pe get, o c'hoarvezout eus un diskarg a-vloc'h pe eus un doniezh dre vras; evit Freud, n'eus ket a gantaezadoù diemouez.

affect-

• *affects pathogènes* kantaezadoù kleñvedus • *éprouver des affects* kantaezañ • *état affectif* stad kantaezel • *les dispositions de l'affectivité* tuedoù ar gantaezelezh.

affection ◇ **affection** ◇ **1 -ad, (-)anaez** g., **klañvadur** g. **2 (-)naoued** g. **-où** 1 Termenoù hollek o verkañ nep argerzh kleñvedel, ha pa ve anafel pe arc'hwele hepken, hep lakaat an arbennoù e penn kont. 2 Anaed o c'hoarvezout eus un anaf, ur gammneuziad, un tizhad neuziadurel, ha n'eo ket eus strafuilhoù arc'hwele hepken (sl. *syndrome, maladie*)

affection

• *affection articulaire* arzadg. • *affection cutanée* kroc'henanaez • *affection dégénérative du cervelet* naoued dic'henezhadel a'n ilpenn • *affection cardiaque, cardiopathie* kalonnaoued • *affection cardiovasculaire* naoued kalongwazhiedel • *affection déterminée par un Champignon* klañvadur diwar Foue • *affection familiale* anaed familhel • *affection hépatique* naoued avu • *affection métabolique* anaed kennevidel • *affection motrice ou psychomotrice* anaed loc'hadel pe vredloc'hadel • *affection provoquée par la morsure des araignées* klañvadur devoudet gant brazhad ar c'hevind • *le traitement d'affections multiples* prederiañ anaedioù diseurt.

afférent ◇ **afferent** ◇ **degas, degasat** aa. O vont d'un organ hag o tegas dezhañ ul liñvenn (gwad, limf, h.a.) pe ul lanv (nervel) (sl. *efférent*).

affér-

• *artérioles afférentes et efférentes* talmerennigoù degas hag ezkas • *canal afférent* san degas • *la racine postérieure des nerfs rachidiens est afférente et sensitive* gwrizienn a-gein an nervernoù a-livenn zo degasat ha santadel • *les veines sont efférentes et les artères afférentes* ezkasat e vez ar gwazhiennoù ha degasat an talmerennoù.

affinité ◇ **1 3 affinity 2 avidity** ◇ **1 krafusted** g., **lenidigezh** b. **2 lontegezh** b. **3 kerc'husted** b. 1 Tuadur ar c'horfoù kimiek da gediañ. 2 Termen hangaoniezh, kreñvder an ere etre an antigen hag an antikorf; an antikorfou o kediañ laosk ouzh

an antigen hag o tigeriañ didenn a lavarer goulontek, endra reer goulontek eus an antikorfoù o stagañ start ha stabil. 3 Termen homeopatiezh, gwered hanbarus ul lia war ur reizhiad, ur gwriad, un organ.

affin-

• *affinité de l'oxygène pour l'hémoglobine* krafusted a 'n oksigen ouzh an hemoglobin • *anticorps de faible, de haute affinité* antikorfoù goulontek, goulontek • *ayant une affinité égale pour les colorants acides et basiques* keitkrafus ouzh al livuzennoù trenkek ha bazek • *composant tissulaire ayant une affinité pour les colorants basiques* kedrann wiad lenidik ouzh al livuzennoù bazek.

affrontement ◇ ◇ **devriañ** Degas e diastok an div vriell eus ur gouli daraezel pe surjanel war-benn aesaat d'ar c'hleizennañ.
affusion ◇ **affusion** ◇ **arskuilh** pa. & g. Arloañ dour ouzh ar c'horf pe ouzh ur parzh anezhañ diwar-bouez un duellenn pe ul lestr.

agalactie ◇ **agalactia** ◇ **laezhanvorc'h** g. Ezvezañs ar borc'hañ laezh goude gwilioudiñ.

agammaglobulinémie ◇ **agammaglobulinaemia** ◇ **gwadanvec'h** g. **gammaglobulin**, **gwadisvec'h** g. **gammaglobulin** Ezvezañs pe diouer gammaglobulin er gwad.

âge ◇ **age** ◇ **oad** g. Padvezh aet hebiou abaoe ar c'hanedigezh.

âge gestationnel ◇ **1 gestational age** **2 fertilization age** ◇ **1 bec'hiegevezh** g. **2 oad engehentad** 1 Padvezh ar vrazedzed kontet diwar deiz kentañ ar mizioù diwezhañ, eleze e-tro 280 devezh. 2 Oad an engehentad (rizhell pe krouell) jedet diwar deiz tebek ar frouezhigiñ.

âge mental ◇ **mental age** ◇ **1 oad meiz** **2 oad bred** 1 Derez an diorreadur kefredel diraezet gant un hinienn; evit an den reol, dre dermenadur ez eo par an oad meiz d'an oad gwerc'hel (sl. *quotient intellectuel*). 2 Derez an diorreadur kefredel ha kantaezel war un dro.

âge osseux ◇ **bone age** ◇ **oad eskern** Stad diorreadur an eskern, priziet dre skinluniñ feunteunigoù ar vagadell, dorn hag arzorn ar c'hrennard, mellezou kloppenn an oadour.

âge : premier ~ ◇ ◇ **oad kentañ**, **hoal** g. **kentañ** An daou vloavezh kentañ eus an hoali (sl. *nouveau-né, nourrisson*).

âge : second ~, **deuxième** ~ ◇ ◇ **eilvet oad**, **eilvet hoal** Padvezh etre an eil hag ar pempet deiz ha bloaz (sl. *enfance*).

âge : quatrième ~ ◇ ◇ **pevare oad**, **pevare hoal** Termen o verkañ an dud hirhoalet peuramzalc'hiat.

âge : troisième ~ ◇ ◇ **trede oad**, **trede hoal** Termen diredis o verkañ an diwaziaded diamzalc'h.

agénésie ◇ **agenesia** ◇ **1 angouenn** g. **2 anpar** g. 1 Dic'halloud da ouennañ. 2 Paouez diorren parzhioù 'zo a 'r rizhell o tevoudañ kammneuziadoù hag euzhegezhioù.

agénésique ◇ **agenesic** ◇ **1.1 angouennek** aa. **1.2 angouenneg** g. **-eion** **1.3 angouennel** aa. **2.1 anparek** aa. **2.2 anparel** 1.1 Gant an angouenn. 1.2 Hinienn angouennek. 1.3 A-zave d'an angouenn. 2.1 Gant an anpar. 2.2 A-zave d'an anpar.

agénésique : homogénéisie ~ (**Broca**), **agénésie** ◇ ◇ **kengediusted** b. **angouennek** Gaonac'hded an hiniennoù ganet diwar an embaradur etre hiniennoù allouenn.

agénitalisme ◇ **agenitalism** ◇ **anganadegezh** b. Stad un hinienn e diouer enborc'hadur e wagrennoù revel.

agent

• *agent chimique* gwezher kimiek • *agent de la blastomycose* gwezher ar blastomikoz • *agent du trachome* gwezher an trakom • *agent infectieux* gwezher pore • *agent mouillant* gwezher glebius, gwezher glebiusaat, glebiuzenn, glebiusaer • *agent pathogène* gwezher kleñvedus, klañvwezher, klañvuzenn • *agent physique* gwezher fizikel • *agent responsable de la syphilis* gwezher kiriek d'ar sifiliz • *agent thérapeutique* gwezher yac'hadel • *causé par un agent mécanique* devoudet gant ur gwezher treloc'hel • *dont l'agent est le vibron cholérique* a zo e zevouder ar vibron kolerek • *parasite, agent de la strongyloïdose* arvevad, gwezher ar strongiloidoz • *Ribovirus agent de plusieurs zoonoses* Riboviruz gwezher da lies milanaez.

agglomér-

• *agglomération de plusieurs furoncles* gronnad a lies hesked.

agglutination ◇ **agglutination** ◇ **dazgludañ** Dazgwered spesadel, anezhañ an tolpañ e kalzennoù bihan o c'hoarvezout gant elfennoù luniek (bakteri, hemati) warno un antigen pa ebarzher an antikorf keñverek el liñvenn ma emaint en arlug.

agglutination passive ◇ **passive agglutination** ◇ **dazgludañ gouzañvat** Dazgwered dazgludañ o c'hoarvezout gant rannigoù anniñv bet staget ent kalvezadel outo antigenoù hezileizh p'o lakaer e diastok an antikorfoù keñverek.

agglutination du col ◇ ◇ **andislev** g. **ar gouzoug** Anvoll gouzoug ar grozh e derou ar gwentloù.

agglutinine ◇ **agglutinin** ◇ **aglutinin** g. Danvezenn spesadel (antikorf) bezant e gwadveizoù 'zo oc'h ober dazgludañ d'ar bakteri (bakterioaglutinin) pe d'an hemati (hemaglutinin) a zo enno an aglutinogen keñverek.

agglutinine froide ◇ **cold agglutinin** ◇ **aglutinin yen** Antikorf dazgludus na c'haller dinoin nemet er gwrezverkoù izel.

agglutinogène ◇ **agglutinogen** ◇ **aglutinogen** g. Danvezenn (antigen) parzhiat e gorre elfennoù luniek 'zo (hemati, bakteri) ouzh o lakaat dazgludadus e diastok gwadveizoù a zo enno an aglutininoù keñverek.

agglutin-

• *agglutinable* dazgludadus • *anticorps agglutinant* antikorf dazgludus • *au moyen d'une réaction d'agglutination* diwar-bouez un dazgwered dazgludañ • *non agglutinant* andazgludus.

agitation, agitation motrice ◇ **agitation** ◇ **kefroù g. kefraouiù & kefreier** Strafulh ar realezh anezhañ muiadur ar fiñverezh, hemañ o vont fourradus ha dizurzhiel; kevret e vez peurliesañ ar c'hefroù gant ar vroudedigezh (sl. *excitation*).

agité ◇ **agitated** ◇ **1 kefraouat** aa. **2 kefraouad g. -ed** 1 O kefraouiñ. 2 Gouziviad o kefraouiñ.

agiter : s'~ ◇ **to be agitated** ◇ **kefraouiñ** Bezañ dalc'h et gant ur barr fiñverezh fourradus ha dizurzhiel.

agit-

• *agitation thermique des molécules* gwrezlavig ar molekul.

aglossie ◇ **aglossia** ◇ **anteod g., teodanpar g.** Ezvezañs c'hanedigel a 'n teod; lodek peurliesañ en un azoniad kammneuziad el anvet dizostoz ar c'haved gant peromeliezh.

agnosie ◇ **agnosia** ◇ **andenaoud g., andaznaoud g.** Koll ar galloud da hennadiñ (denaout pe daznaout) an ergorennoù dre ur skiantenn; ent damkanel e lakaer kemm etre an andenaoud (koll ar galloud da gemer anaoudegezh eus udb. a oa dianav betek neuze) hag an andaznaoud (koll ar galloud da hennadiñ udb. anav endeo); ent embregel e c'hoarvez a-gevret peurliesañ an daou strafuilh hag el lavar klinikel e reer hepken gant an termen *andenaoud* hag e zeveradoù.

agnosie auditive ◇ **auditory agnosia** ◇ **andenaoud klevout, klevandenaoud** Koll ar galloud da reiñ ster d'al lavar teodel; ar gouziviad a glev ar sonioù met ne zec'havael ket o ster.

agnosie auditive verbale congénitale, audimuté de compréhension ◇ ◇ **klevmuderezh g. enluzañ, anenluz g. ganedigel** Stad ur gouziviad ganet mut hep bezañ bouzar, nad eo ket avat evit meizañ al lavar teodel, hag eñ reol e veizegezh.

agnosie digitale ◇ **finger agnosia** ◇ **andenaoud ar bized** Koll ar galloud da hennadiñ bized an unan pe ar re all.

agnosie pour les couleurs ◇ **colour agnosia** ◇ **andenaoud al livioù** Koll ar galloud da hennadiñ al livioù.

agnosie pour les visages, prosopagnosie ◇ **prosopagnosia** ◇ **andenaoud an dremmoù, dremmandenaoud** Koll ar galloud da hennadiñ an dremmoù pe ar poltreoù anezho; e degouezhioù 'zo ned eo ket ar gouziviad evit anaout e zremm dezhañ.

agnosie spatiale ◇ **spatial agnosia** ◇ **andenaoud g. an amegor, amegorandenaoud g.** Koll ar galloud gant ar gouziviad da zelec'hiañ un draezenn e-keñver e gorf ha da emzelec'hiañ e unan, war un dro koll ar c'hounañ glennadel (*ankoun glennadel*).

agnosie tactile, astéréognosie, stéréo-agnosie ◇ **tactile agnosia, astereognosis, stereognosia** ◇ **andenaoud stekiñ, stokandenaoud** Koll ar galloud da hennadiñ an traezoù dre ar stekiñ (sl. *ahylognosie, amorphognosie*).

agnosie visuelle, agnosie optique ◇ **visual agnosia** ◇ **andenaoud gwelout, gwelandenaoud an traezoù** Koll ar galloud da hennadiñ an traezoù dre ar gweled.

agnosique ◇ **agnosic** ◇ **1 andenaoudek 2 andenaoudeg 3 andenaoudel** 1 Gant an andenaoud. 2 Gouziviad an andenaoud. 3 A-zave d'an andenaoud.

-agogue

• *chologogue* bestlec'hokus, bestlec'holuzenn.

agonie ◇ **agony** ◇ **tremenvan b.** Lankad diwezhañ a 'n tremen eus ar vuhez d'ar marv, anezhañ ar steuzidigezh unan hag unan eus arc'hwelioù ar beved.

agoniste ◇ **agonist** ◇ **1 galer** aa. **2 3 galerenn b.** 1 A-zivout ar gigenn o ren ar gwered pennañ en ur fiñvadenn. 2 Kigenn c'haler. 3 Ent hollekoc'h, anadenn pe danvezenn o kendaoliñ d'ur gwered lavaret (sl. *antagoniste, synergiste*).

agoraphobie ◇ **agoraphobia** ◇ **foranarur g.** Arur al lec'hioù egorant pe foran.

1 3 agoraphobique 1.2 agoraphobe ◇ **agoraphobic** ◇ **1 foranarurek** aa. **2 foranarureg 3 foranarurel** 1 Gant ar foranarur. 2 Gouziviad ar foranarur. 3 A-zave d'ar foranarur.

agrafe ◇ **clip, agraffe** ◇ **bac'hig b. -où** Bazhig metal gant pep a vroud en he daou benn a serrer a-c'haoliad war div vriell ur gouli d'o nesaat pe war daou damm un askorn d'o derc'hel e diastok goude un askornbenañ.

1.2 agrammatisme 2 aphasie syntactique ◇ **1 agrammatism 2 syntactical aphasia** ◇ **1.2 agrammategezh b. 2 ankomez g. kevreadurel** 1 Namm e distagadur ar gerioù, anezhañ an diankañ soniadoù. 2 Namm e steuñvenn ar gomz, anezhañ koazhadur ar frazenn d'he atel, steuziadur ar gerioù benveg, anverkadur ar mozioù, an amzerioù, ar reizhoù, an niveroù, dizurzhiad a stader en ankomez Broca.

agranulocytose, aneutrophilie ◇ **agranulocytosis** ◇ **agranulokitoz g.** Steuziadur ar polinuklear neutrofil diouzh ar gwad, anaez marvus peurliesañ o c'hoarvezout da heul ur pore, ur pistriadur, ur skinata.

agranulocytose infantile héréditaire de von Kostmann ◇ **infantile genetic agranulocytosis, Kostmann's disease** ◇ **agranulokitoz g. hêrezhel ar vabaned, kleñved g. von Kostmann** Agranulokitoz familhel dibaot, bet deskriet e 1956 e Sveden, treuzkasat er mod aotozomek enkilus, o teraouiñ ken abred ha deizioù kentañ ar vuhez hag o kas d'ar marv dindan un nebeut mizvezhioù.

agraphie ◇ **agraphia** ◇ **anskriv g.** Koll ar galloud da eztaoliñ dre skrivañ, e-maez strafuilhoù ar santout, al loc'hañ pe ar c'hedren.

agraphie aphasique ◇ ◇ **anskriv ankomzel** Anskriv lodek en un ankomz : reol e vez tresañ an arouezennoù, nemet ez eo strafuilhet arc'hwel an arouezñ drezo.

agraphie apraxique ◇ ◇ **anskriv andigonel** Anskriv lodek en un andigon : ar gouziviad a biaoek a an arouezennoù hag arc'hwel an arouezñ nemet ez eo diaezet kefleuniadur al loc'hadoù ret d'o zresañ (kuit a seizi, a ankedre, a naoued ilpenn pe a zireizh bred).

agraphique ◇ **agraphic** ◇ **1 anskrivek** aa. **2 anskriveg** g. -eion **3 anskrivel** aa. 1 Gant an anskriv. 2 Gouziviad an anskriv. 3 A-zave d'an anskriv.

agrativé, apesanteur ◇ **weightlessness** ◇ **anponnerder** g. Stad ur c'horf a zo mannelaet gwered ar ponnerder warañ.

agrégent, agrégeant ◇ **1 aggregating** **2 aggregating agent** ◇ **1 dazus** aa. **2 gwezher** g. **dazañ, dazuzenn** b. 1 O tec'h an, *in vivo* pe *in vitro*, dazadur ar pladanoù. 2 Danvezenn dazus.

agrégat ◇ **aggregate** ◇ **dazad** g. Kalzad kelligoù ruz pe pladanoù.

agrégation des hématies ◇ **sludging of red cells** ◇ **dazañ an hemati** Tolpadur ar c'helligoù ruz e rolladoù e-barzh ar gwazhied da heul gorrekaat an amred, o kinnig steviañ an talmerennigoù hag ar c'horwazhied.

agrégation des plaquettes ◇ **platelet aggregation** ◇ **dazañ ar pladanoù, dazadur** g. **ar pladanoù, pladandazañ, pladandazadur** g. Englenadur ar pladanoù o c'hoarvezout, *in vivo*, e-barzh ar gwazhied, o tisoc'h gant furmidigezh un trombuz hedreuz (dazadur eiltroù); en un eil pazenn ez a stankoc'h an trombuz (dazadur dieiltro) ha steviañ ar wazhiedenn (broch pladanel an trombuz gwenn), pazenn diwezhañ ar gwadkaeñ eo (sl. *activité agrégante plaquettaire*).

agrégomètre ◇ **aggregometer** ◇ **dazañventer** g. -ioù, **agregometr** g. Ardivink spektrofotometrek evit muzuliañ dazadur ar pladanoù *in vitro* dindan wezherioù diseurt.

agrég-

• *agrégabilité* dazadusted • *l'agrégation d'une suspension plaquettaire* dazadur un arlugañ pladanoù • *liquide contenant des particules ou des agrégats* liñvrenna a zo strewet enni rannigoù pe dazadoù.

agression ◇ **aggression** ◇ **1 darwantad** g. **2 keuziad** g. 1 Real argadus enep ub. dre feulster korfel, lavarel pe argelel. 2 Darvoud kleñvedel trumm a-berzh ur barenn noazus ezdeuat pe endeuat, daraezel, fizikel, kimiek, poreel, nervvredel.

agressivité ◇ **aggressiveness** ◇ **1 argadusted** b. **2 darwantusted** b., **argadusted** 1 Tued bezant en traoù bev o doug da zistrujañ ar re all. 2 Er Vredoniezh, doug an neuzid o tont erzerc'h dre realoù galen, o kemer hent ar mont diouzh (nac'h reiñ skoazell) koulz ha hent ar mont da dre ar feulster korfel ha lavarel pe dre emzalc'hioù argelel (gwenvrazh); er Bredelfennerezh e reer kentoc'h gant *argadusted*.

agressologie ◇ **aggressology** ◇ **keuziadouriezh** b. Diskiblezh o plediñ gant ar c'heuziadoù.

agress-

• *agression chirurgicale* keuziad surjiañel • *agression infectieuse ou toxique* keuziad lestel pe bistriel • *agression sexuelle* darwantad revel • *laxatif peu agressif* laoskuzenn anhegus a-walc'h • *agressologue* keuziadour • *réactions agressives* darwantadoù • *troubles du caractère : agressivité, opposition, turbulence, instabilité* direizhoù an neuzid : darwantusted, arbennusted, brezike-erezh, distabiled.

agueusia ◇ **ageusia, ageustia** ◇ **antañva** g. Leiadur pe steuziadur skiantenn an tañva, dic'halloud da verzhout ar blazennoù.

agueusique ◇ **ageusic** ◇ **1 antañvaek** aa. **2 antañvaeg** g. **3 antañvael** aa. 1 Gant an antañva. 2 Gouziviad an antañva. 3 A-zave d'an antañva.

ahylognosie, anhylognosie, agnosie d'intensité ◇ **ahylognosia** ◇ **andenaoud** g. **an dafarou, andenaoud a-ental** Koll ar galloud da anaout natur an danvez dre ar stekiñ (sl. *agnosie tactile, amorphognosie*).

aide fonctionnelle ◇ **functional aid** ◇ **harp** g. -où **arc'hwelel** Pezh, benveg pe ardivink (e-maez an erstedelloù hag an amstedelloù) evit aesaat oberiezhoù pemdeziek an nammidi; kemm a lakaer etre an *harpoù arc'hwelel emzilec'hiañ* (beloù, kadorioù ruilh), an *harpoù skiantennel* (lunedoù, stenamplaerioù), an *harpoù gavaelañ*, lenn, emwiskañ, h.a.; an *traezoù kempennet* hervez ezhommoù an nammidi evit debriñ, skrivañ, h.a. a renker ivez e-touez an harpoù arc'hwelel.

aide à la marche ◇ **walking aid** ◇ **harp da vale** Harp arc'hwelel da barraat ouzh an diaester emzilec'hiañ (beloù, dorn red, kerzherell).

aide médicale ◇ **medical assistance** ◇ **gwared** g. **mezegel** Teskad ar prederioù mezegel a vez nep klañvour tavantek e gwir da zegemer, er gêr pe en ospital, e karg hollel pe darnel ar c'hevredin.

aide sensorielle ◇ **sensorial aid** ◇ **harp** g. **skiantennel** Harp arc'hwelel da barraat ouzh skorted ur skiantenn, ar gweled, ar c'hleved (lunedoù, stenamplaer).

aide sociale ◇ **social assistance** ◇ **1 gwared kevredigezhel, kedward** g. **2 gwarederezh** g. **kevredigezhel, kedwarderezh** g. 1 Teskad ar skorennoù pe skoazelloù, e traezoù pe e moneiz, lakaet e kerz an dud dic'houest da vastañ d'o ezhommoù bevret. 2 Gwazerezh foran a zo en e garg dezholiñ emvataerion ar c'hedward hag e bourvezañ dezho.

aide-soignant ◇ **nursing auxiliary** ◇ **adklañvdour** g. -ion Aroueler diplomet o skoazellañ ar glañvdiourion.

aigu

- *bronchopneumopathie aiguë ou subaiguë* bronkezskeventad lemm pe goulemm • *intoxication aiguë* pistriadur lemm • *phase aiguë* pazenn lemm, pazenn lemm • *rhumatisme articulaire aigu* remm lemm an arzoù (sl. *acuité*).

aiguille radioactive ◇ **radioactive needle** ◇ **nadoz b. skinoberiek** Mammenn linennek a skinad gamma arveret er c'hurigurañ engwiad, o c'hoarvezout pe eus ur gorzenn vetal enni ar poultr skinoberiek, harzus he speurennoù ouzh ar skinadoù alfa ha beta, pe eus un neudenn a skinizotop kaenet gant platin.

aiguille vectrice ◇ **driving needle** ◇ **nadoz sanier, sanierez b.** Nadoz kleuz anoberiek a sanker dindan reolerezh dre skinluniñ kent ebarzhiñ enni un neudenn skinoberiek.

aine ◇ **groin** ◇ **barlenn b.** Tachad eus ar c'horf etre kof ha morzhed, daou rannbarzh ouzh e ober : an eil, ar rannbarzh barlenn-kof, riblenn 3 cm led a-us da bleg ar varlenn, dindani kanol ar varlenn, egile, ar rannbarzh barlenn-morzhed, a-is d'ar pleg, hanterenn grec'h talbenn araoek ar vorzhed ; al lodenn grec'h diabarzh anezhi zo tric'hogn ar vorzhed.

ainhum ◇ **ainhum g.** Trofoneuroz dianav e arbenn o tizhout ent hanbarek ar c'houreved a ouenn du ha naouus dre ambid emdarzh ur biz troad, ar pempet peurliesañ.

AINS, anti-inflammatoires non stéroïdiens ◇ **AINS** ◇ **EFAS g., enepfoeier l. (enepfoeg g.) ansteroidel** Rumm liaoù erskrivet ouzh an danijenn, tri stroll anezho : an aspirin, an enepfoeier ansalikilek, ar c'hoksiboù.

aire

- *aire parastriée* leur lez-rizennek • *aire péristriée* leur dro-rizennek • *aire septale, area subcallosa, circonvolution sous-calleuse* gorread endan-garne • *aire striée, aire 17* leur rizennek, leur 17 • *en petites aires multiples* a dachadoù bihan paot • *l'augmentation de l'aire de cette surface* muiadur ment ar gorre-se.

aisé

- *séparation de deux organes ou de deux formations selon un plan aisé* disrannañ daou organ pe daou furmadur hervez un dalenn araezus.

aisselle ◇ **axilla, armpit** ◇ **kazel b. -ioù & divgazel** Kavenn dindan gevre ar vrec'h ouzh ar skoaz.

ajust-

- *tube s'ajustant au collet d'une dent* korzenn o vont klenk ouzh gouzoug un dant.

akinésie, acinésie ◇ **akinesia** ◇ **anfiñv g.** Digresk pe steuziadur ar fiñvoù emdarzh ha diarzoug ha gorregezh ar fiñvoù diarvonn, lodek en azoniad Parkinson ; en e varr, emañ ar strafuilh-mañ lodek er simud anfiñvel.

akinétique, acinétique ◇ **akinetic** ◇ **1 anfiñvek aa. 2 anfiñveg g. 3 anfiñvel aa.** 1 Gant an anfiñv. 2 Gouziviad an anfiñv. 3 A-zave d'an anfiñv.

akinétique : crise ~ ◇ **akinetic failure** ◇ **barrad g. anfiñvel** Furm droukfell leiek ankridel, naouus dre steuz ar fiñvoù hag ar goabrennegezh.

alacrymie ◇ **eye dryness** ◇ **daeranvorc'h g.** Ezvezañs ar borc'hañ daeroù.

alactasie ◇ **lactase deficiency** ◇ **anlaktaz g.** Ezvezañs c'hanedigel al laktaz (enzim o tourrannañ al laktoz) e-barzh glaourgenn ar pervez, o tevoudañ angougemer al laktoz.

alalie

- *alalie congénitale* klevmuderezh ezluzañ, anezluz ganedigel (sl. *audimutité d'expression*).

alarme : réaction d'— ◇ **alarm reaction** ◇ **erwez h g. arfrou** Pazenn gentañ an azoniad emazasaat, ouzh he ober ar bleuz hag an erwezhoù enepbleuz kentañ (sl. *adaptation : syndrome d'~*).

alastrim, paravariolè, varioloïde, variolè mineure ◇ **alastrim, milk pox, white pox, amass, paravariola, variola minor** ◇ **alastrim g., lezvrec'h b., brec'h b. leiek** Kleñved tredizhus darreuziat stadet en Amerika (en Antilhez pergen), e Suafrika hag en India, o tagañ ar Re Zu dreist holl, a denn e azonoù da re ar vrec'h hag ar vrec'h nij ; tennañ a reer d'ober anezhañ ur furm leiek eus ar vrec'h o skeiñ gouziviaded an- pe amvaksinet.

albinisme ◇ **albinism** ◇ **albinegezh b.** Gwariadenn c'hanedigel eus kennevid ar melanin, o naouiñ dre ezvezañs darnel pe hollel al livegenn-se ; pa vez lec'hiek, e tizh gwazhiedsae ar voull lagad (uvea) ; pa vez hollek, e tizh ivez ar c'hroc'hen hag ar faneroù.

albinos ◇ **albino** ◇ **1 albinek aa. 2 albineg g. -eion** 1 Gant an albinegezh. 2 Gouziviad an albinegezh.

albinos : œil ~ ◇ ◇ **lagad g. albinek** Lagad hep livegenn uveel, alies tizhet ivez gant ar bouc'hwel hag an nistagmuz.

albugo ◇ **albugo** ◇ **albugo g.** 1 Strafuilh teñvañ o naouiñ dre vrizhennoù bihan diadreuz, rizennek pe get. 2 Brizhenn wenn vihan war ar gornsaek, devoudet gant un tolpad greunigoù druzoni er gwiad anezhi.

albumine ◇ **albumin** ◇ **albumin g.** Holoprotein dezhañ un derez trenkegezh ; hervez an orin e tiforc'her al laktalbumin (albumin al laezh), an ovalbumin (albumin ar vi) hag ar seroalbumin (albumin oc'h ober etre 55 ha 60 % eus proteinoù ar gwadveiz).

albuminémie ◇ **albuminaemia** ◇ **gwadvec'h g. albumin, albuminwadvec'h g.** Feur an albumin er gwadveiz (e-tro 40 g/l).

albuminorachie ◇ **keinvec'h g. albumin, albumingevinvec'h g.** Feur an albumin el liñvenn benn-kein.

- albuminurie** ◇ **albuminuria** ◇ **1 troazhalbuminegezh** b. **2 troazhvec'h** g. **albumin, albumindroazhvec'h** g. 1 Bezañs albumin en troazh. 2 Feur an albumin en troazh.
- albumose** ◇ **albumose** ◇ **albumoz** g. Polipeptid, disoc'h diwar goazhadur diglok ar proteinoù.
- alcalinimétrie** ◇ **alcalimetry** ◇ **bazventerezh** g., **alkalimetriezh** b. Dezventañ bazegezh ul liñvenn vevel, ar gwad pergen.
- alcalinothérapie** ◇ **alcalitherapy** ◇ **alkaligurañ** Arver yac'hadel an halioù alkaliek, ar bikarbonat natriom pergen.
- alcaloïdes** ◇ **alkaloids** ◇ **alkaloid** s. **-enn** Rumm bazennoù nitrogenek plantel a zelun kemplezh, gweredus kenan war arc'hwelioù bevedel 'zo, en o zouez ar morfîn, ar c'hinin, an atropin, ar c'hurar, ar c'hafein; reoù anezho zo pistrîoù (nikotin, striknin) pe baderioù (kokain, meskalin); arveret e vez ul lod kaer anezho er Vezekniezh — nes e vez peurliesañ o doen yac'hadel d'o doen pistrîel.
- alcalose** ◇ **alkalosis** ◇ **alkaloz** g. Tuadur da isvec'h an ion H⁺ er plasma hag el liñvennoù entremezel, ent strizh : muiadur dreist 7,40 eus pH ar plasma er gwad talmerel.
- alcalose compensée** ◇ **compensated alkalosis** ◇ **alkaloz kevassavet** Tuadur da isvec'h an ion H⁺ er plasma hep muiadur ar pH bennozh da wered an danvezennoù skurzer, ar bikarbonatoù pergen.
- alcalose de reventilation** ◇ **rebreathing alkalosis** ◇ **alkaloz dazgwentadur** Prantad alkaloz o c'hoarvezout da geñver distro ur gwentadur logigel bastus gant gouzviad ar skorted analadel henek grevus.
- alcalose décompensée, alcalose vraie** ◇ **uncompensated alkalosis** ◇ **alkaloz ankevassav, gwir alkaloz** Muiadur pH ar plasma er gwad talmerel dreist 7,40; c'hoarvezout a ra pa sav feur ar bikarbonatoù ken ne spir ken ar gwikefreoù arouleviañ.
- alcalose métabolique** ◇ **metabolic alkalosis** ◇ **alkaloz kennevidel** Alkaloz diwar muiadur kevret ar feur bikarbonatoù ha pH ar plasma dre ezvennañ an trenkennoù (c'hweladoù) pe euvriñ reñverek bikarbonatoù.
- alcalose respiratoire, alcalose gazeuse** ◇ **gaseous alkalosis** ◇ **alkaloz analadel, alkaloz aezhel** Alkaloz diwar goll reñverek ar CO₂ dileizhet er plasma da heul an uswentañ logigel o tec'h an muiadur ar pH ha leiadur ar bikarbonatoù.
- alcapnone, acide homogentisique** ◇ **alcapnone** ◇ **alkapton** g., **trenkenn** b. **homogentizek** Kediaad diwar ec'haozañ diglok amindrenkennoù aromatek, fenilalanin ha tirozin.
- alcaptonurie** ◇ **alcaptonuria** ◇ **troazhalkaptonegezh** b. 1 Bezañs alkapton en troazh. 2 Ezreolder enzimatek hêrezhel, anezhañ isvec'h an oksidaz homogentizek en avu hag el lounezh, o tevoudañ yoc'hadur an alkapton er gwad hag en troazh.
- alcool** ◇ **alcohol** ◇ **alkool** g. **-où** Anv roet da nep danvezenn vevel a zo enni bonad –OH anionadus, ankrafet rageeun ouzh ur c'horvell aromatek evel ma kaver gant ar fenolioù; arveret hep spizer, e talvez *alkool* kement hag *alkool etilek*, an hini a gaver en diedoù; kemm a lakaer etre an *diedoù alkoolek*, an alkool enno diwar ar goiñ anezho, hag an *diedoù alkoolaet*, ouzhpennet alkool dezho.
- alcool benzylique** ◇ **benzyl alcohol** ◇ **alkool benzilek, benzilalkool** g. Dilester fenolek, arveret ivez gant an dentourion evel dieraezer lec'hel diastok.
- alcool éthylique, éthanol** ◇ **ethyl alcohol, ethanol** ◇ **alkool etilek, etilalkool** g., **etanol** g. Alkool kentael a vez dezhañ lies arver er vezekniezh : arloet ouzh ar c'hroc'hen evel dilester diavaez, diounezet dre ar genoù pe ar wazhienn evel ergurer an delirion, ensilet en nervenn evit terriñ d'an nervostoù kilvers, dewentet evel gwezher enebon evit diren gouliñv ar skevent.
- alcoolat** ◇ **alcoholate** ◇ **alkoolat** g. Angevezh aozet dre strilhañ etanol war struzhennoù fresk pe sec'h.
- alcoolature** ◇ **alcoholature** ◇ **akoolatur** g. Angevezh aozet dre vezhiañ struzhennoù fresk en etanol, hemañ o werediñ dre e berzhioù dileizhiñ ha douhenniñ.
- alcoolé** ◇ **alcoholic tincture** ◇ **tentur** g. **alkoolek** Angevezh aozet dre zileizhiñ gwezhuzennoù struzhel pe loenel en alkool.
- alcoolémie** ◇ **alcoholaemia** ◇ **gwadvec'h** g. **alkool, alkoolwadvec'h** g. Feur alkool er gwad da heul euvriñ un died alkoolek; hervez lezenn Frañs, ur gwadvec'h dreist 0,5 g/l (pe 10,8 mmol/l) zo un dorridigezh hag a washa kiriegezh ur blenier karbed.
- alcoolépilepsie** ◇ **droukfell alkoolien** Barradoù droukfell dec'haret gant bezañs an etanol er gwad.
- alcoolisation** ◇ **alcoholization** ◇ **1 alkoolañ 2 alkoolaet, alkoolensilañ** 1 Beveziñ alkool. 2 Araezad yac'hadel en amboaz enepgost, anezhañ ensilañ etanol 60° e kef an nervenn a-geñver gant al laur.
- alcoolisme, éthyliste** ◇ **alcoholism, ethylism** ◇ **alkoolegezh** b., **etilegezh** b. 1 Alkoolegezh lemm, strafuilh berrbad ar realezh da heul reevriñ diedoù alkoolek. 2 Alkoolegezh henek, teskad an direizhoù nerval, bredel ha kreudel diwar ar bevezñ alkool reñverek ha padus.
- alcoolodépendance** ◇ **alcoholomania** ◇ **alkoolestoue** g. Kaezhiadezh ouzh an alkool.
- alcoolologie** ◇ **alcoholology** ◇ **alkoolouriezh** b. Studi an etanol hag ar gweredoù anezhañ war ar bevedeg.
- alcoolomanie** ◇ **alcoholomania** ◇ **1 alkoolestoue 2 alkoolarsoc'h** g. 1 sl. *alcoolodépendance*. 2 Anvad roet gant aozerion da brantad enkelat ar pistrîadur alkoolel henek ma ne stader nemet an arsoc'h, eleze ar stad a ziouer.
- alcoolopathie** ◇ ◇ **alkoolanaez** g. Teskad gweredoù kleñvedel an alkoolegezh.
- alcoolothérapie** ◇ ◇ **alkoolgurañ** Arver yac'hadel an alkool.

1 alcootest (merk marilhet) 2 éthylorest de type A ◇ ◇ **1 alcootest g. 2 etilverker g. -ioù a rizh A** Ardivink hezoug o talvoud da briziañ derez ar gwadvec'h alkool dre vuzuliañ diwar-bouez un dazgwered kimiek feur an alkool en aer ec'hanalet (sl. *éthylomètre, éthylorest*).

aldéhyde ◇ **aldehyde** ◇ **aldehydenn b.** Kediad o tisoc'h eus oksidañ un alkool, ar soaz $-CH_2OH$ eus hemañ o vont da $-CHO$.

aléa thérapeutique ◇ **therapeutic hazard** ◇ **ec'hoar g. mezegadel** Gaouad korfel andisplegatus gant dedro an anaev prederiet, o c'hoarvezout da geñver ur gwezh mezegel hep ma c'hallfed arzodiñ fazi, beiad pe diampartiz d'ar c'hoskor mezegeañ.

aléatoire

• *L'agitation thermique des molécules communiquant de façon aléatoire de l'énergie cinétique aux particules en suspension* gwrezlavig ar molekul o kefladañ ent neparek gremm fiñvek d'ar rannigoù en arluc.

aleucie ◇ **aleukia** ◇ **aleukiezh b.** Olgwenn eizhañ.

alexie ◇ **alexia** ◇ **anlenn g.** Strafuilh arzeuat, anezhañ koll ar galloud da intent ar gerioù skrivet pe moulet, diwar un anaf empenn; da zigemmañ diouzh ar milenn (sl. *dyslexie*).

alexique ◇ **alexix** ◇ **1 anlennek aa. 2 anlenneg g. -eion 3 anlennel aa.** 1 Gant an anlenn. 2 Gouziviad an anlenn. 3 A-zave d'an anlenn.

alexie agnosique, cécité verbale ◇ **agnosic alexia** ◇ **anlenn andenaoudel, andenaoud g. ar gerioù, geranlenn g.** Anlenn lodek en un andenaoud; bonan e chom an eztaoliñ dre gomz ha dre skrid.

alexie aphasique ◇ **aphasic alexia** ◇ **anlenn ankomezl** Anlenn lodek en un ankomez enluzañ (ankomez Wernicke); strafuillhet e vez al lavar en e holl vodoù.

alexithymie ◇ **alexithymia** ◇ **disnoa g.** Heudadur breidel a vir ouzh ar gouzrec'h a erzerc'hañ e gantaezadoù.

alexithymique ◇ **alexithymic** ◇ **1 disnoaek aa. 2 disnoaeg g. -eion 3 disnoael aa.** 1 Gant an disnoa. 2 Gouziviad an disnoa. 3 A-zave d'an disnoa.

alèze, alaise, alèse ◇ **aleze, draw sheet** ◇ **arlenn b.** 1 Pezh gwriad a-wechoù antreuz stignet war c'horre ar vatarasenn d'he gwareziñ ouzh ar c'housioù. 2 Lien kaoutchouget pe vezellaet dishadennet stignet war daol ar binvioù pe war an daol oberata.

algésimètre ◇ **algesimeter** ◇ **laurandaler g. -ioù** Ardivink o vuzuliañ read ar gentrigenn ret da zec'han laur.

algide ◇ **algid** ◇ **riviati aa.** 1 Gant ar riviadezh. 2 A-zave d'ar riviadezh.

algidité ◇ **algidity** ◇ **riviadezh b.** Stad kleñvedel azonet dre ar riv, yenidigezh an eizhaennoù hag an tuadur d'ar c'hoempad, ar gwrezverk kreiz o chom reol peurliesañ.

algie ◇ **pain** ◇ **laur g. -ioù, gost b.** Poan en ul lec'h resis eus ar c'horf; e degouezhioù 'zo a boanioù breidel ken grizias ma vezont gouzañvet evel poanioù kreudel, e reer gant *laur*, sk. : laur aske ar melankoleg; evit *gost* a vez arveret e rezh al lostger *-ost* b. ouzh ar pennnav oc'h aroueziañ ur parzh korf : *dentost, keinost, kaherost, nervost*, h.a. (sl. *douleur, souffrance*).

algie craniofaciale ◇ **facial and cephalic pain** ◇ **laur klopenn-dremm** Anvad rumm holl azoniadoù laurel ar c'hlopenn hag an dremm, ha pa vent laurioù gwazhiedel, kernadoù pe ledostoù, klopennadoù pe nervostoù (trigevell pergen) pe c'hoazh poanioù dispislec'h dezho da orin an dent, ar c'hevioù, al lagad, h.a.

algie vasculaire de la face, algies sympathiques de la face, sympathalgie faciale, causalgie faciale, névralgisme facial ◇ **vascular headache, cluster headache, migrainous neuralgia, sympatheticalgia of the face** ◇ **dremmost b. wazhiedel, laurioù simpatek an dremm, simpatost an dremm, laur gwazhiedel al ledpenn, goriaz b. an dremm** Anvad lakaet war laurioù an dremm hag a-wechoù ar c'hlopenn, dispislec'h, o sezañ diouzh un tu, alies diouzh an daou du, anat perzhiadur ar gwazhied enno dre o foulzusted hag ar strafuilh gwazhiedloc'hadel o tont d'o heul (ruzded an dremm, darwazh ar c'hevresaeoù, daeraouiñ, beradur ar fri ha fri stanket).

algodystrophie sympathique, algoneurodystrophie ◇ **sympathetic algodystrophy** ◇ **algodistrofiezh b. simpatek** Teskad azoniadoù gwazhiedloc'hadel ha teñvel a orin simpatek; en ezel krec'h e teskriver an azoniad skoaz-dorn, an osteoporoz laurel diandaraez, furmoù goriaz; en ezel traoñ e vez tizhet aliesañ an treid, an daoulin, an divlez; anadenn voutin d'an holl furmoù eo an danavidigezh eus anneauenn an eskern.

algique ◇ **algetic** ◇ **1 laurek aa. 2 laurus aa. 3 laurel aa.** 1 Gant laur da azon. 2 O tec'han laur. 3 A-zave d'al laur.

algogène ◇ **algogenic** ◇ **laureiat aa.** O tevoudañ laur.

alghallucinose ◇ **tasmantost b.** Laur merzhet gant an ambeideon en o ezel tasmant.

algotagnie ◇ **algotagnia** ◇ **laurgediañ** Ezhomm evit kaout bliz er gread revel da lauriñ (*laurgediañ gouzañvat*) pe d'ober lauriñ (*laurgediañ oberiat*) (sl. *masochisme, sadisme*).

algotomanie ◇ **algotomania** ◇ **laurvar g.** Tech mac'hennek da c'houzañv laur.

1 2 algomane 3 algomaniaque ◇ **algotomaniac** ◇ **1 laurvariati aa. 2 laurvariati g. -ed 3 laurvarel** 1 Gant al laurvar. 2 Gouziviad al laurvar. 3 A-zave d'al laurvar.

algoménorrhée, dysménorrhée ◇ **algotoménorrhoea, dysmenorrhoea** ◇ **mizlaur g.** Mizioù laurus.

algoménorrhéique, dysménorrhéique ◇ ◇ **1 mizlaurek aa. 2 mizlaurel** 1 Gant ar mizlaur. 2 A-zave d'ar mizlaur.

algotparalysis ◇ **painful paralysis** ◇ **seizi** aa. **laurek** Seizi kevret gant laur.

algotparésie ◇ **painful paresis** ◇ **gouseizi** g. **laurek** Gouseizi kevret gant laur.

algotparesthésie ◇ **painful paraesthesia** ◇ **kammeraez** g. **laurek** Kammeraez kevret gant laur.

algotpareunie, dyspareunie ◇ **dyspareunia** ◇ **keventrost** b. Laur gouzañvet gant ar vaouez e-doug ar gediadenn revel e-maez pep anaf pe strafuilh arc'hwelel.

algotphilie ◇ **algotphilia** ◇ **laurvre** b. Tech kealiadel (kevrinadel pe psikoze) da c'houzañv laur, diforc'h diouzh ar vazoc'hegezh dre an ezvezañs a eulegezh erotek, diouzh al laurvar dre an ezvezañs a wikefre neurozel.

1 2 algophile 3 algophilique ◇ **1 algophilic 2 3 algophilic 1 laurvreat** aa. **2 laurvread** g. **-ed 3 laurvreal** aa. 1 Gant al laurvre. 2 Gouzviad al laurvre. 3 A-zave d'al laurvre.

algotphobie ◇ **algotphobia** ◇ **1 laurargas** g. **2 laururur** g. 1 Aon rak al laur dre reñver kizidigezh. 2 Aon neurozel rak al laur, azon un neuroz arurel.

alg-

- *arthralgie* arzost • *cellulalgie, cellulite* kenglenost, kenglenfo • *céphalalgie* poan benn, droug penn, klopennad, klopennost
- *éprouver une algie, éprouver une douleur* lauriñ • *cervicalgie* chougot • *forme sudoro-algique* furm c'hweziñ-lauriñ • *sympathalgies* simpatostoù.

aliment ◇ **functional food** ◇ **maglia** g. **-où** Boued pe maguzenn o piaouañ perzhioù kurañ pe ergurañ (sl. *nutraceutique, probiotique*).

“Alice au pays des merveilles” : syndrome d'~ ◇ **“Alice in wonderland” syndrome** ◇ **azoniad** g. **“Alis e bro ar marzhoù”** Furm eus azoniad an distreüniñ naouus dre un anglevad a gorregezh pe a ramzegezh, stadet er skizofreniezh ha da heul anafoù empenn ha pistriadurioù 'zo.

aliénation, aliénation mentale ◇ **insanity** ◇ **envedi** b. Termen lezennel o verkañ ar c'hleñved bred e kement ma rank ar barnerezh derc'hel kont anezhañ (darbaroù gwareziñ ha prederiañ ar c'hlañvour, andalañ kiriegezh ar gehuzidi); un arver all zo da *envedi* er vredkleñvedouriezh (sl. *démence*).

aliéné ◇ **insane** ◇ **1 envet** aa. **2 enved** g. **-ion** 1 Sellet evel bredklañvour gant ar barnerezh. 2 Bredklañvour e diarsell ar barnerezh [an termenoù *aliéniste, alienist (alienour)* arveret en 19t kantved a voe dilezet en 20t kantved e gounid *psychiatre, psychiatrist, bredvezeg*].

aliment ◇ **food, aliment** ◇ **boued** g. Nep danvezenn vezhur, eleze o pourchas d'ar bevedeg an dafar ret d'e zerc'hel bev, da ziogetiñ e gresk hag e zispignoù gremm, arc'hwel e organoù, ha da amparañ e arboelladoù (sl. *nutriment*).

aliment de base ◇ **staple food** ◇ **bonvoued** g. Boued a vez bevezet reoliek en ur rannir pe gant ur strollenn hag o pourchas un darn vras eus ar c'halorioù pemdeziek.

aliment complet ◇ **complete food** ◇ **boued klok** Boued a zo ennañ a feurioù azas an holl elfennoù ret d'ar mezhur.

aliment de sevrage ◇ **weaning food** ◇ **boued dizonañ** Boued amkanet da vastañ da ezhommoù mezhur spesadel ar magadelled er prantad dizonañ, arveret er broioù war ziorren evit dizarbenn kleñved an dizonañ.

aliment diététique ◇ **dietetic food** ◇ **boued hanren** Boued kempennet ha reolet e gedrannoù diouzh un hanren erskrivet.

aliment protecteur ◇ **protective food** ◇ **boued gwarez** Boued diogelet ennañ feur ar maguzennoù bevret, erbedet er broioù skort o loazioù bevañs.

aliment traditionnel ◇ **conventional food** ◇ **boued boaziek** Boued kenderc'het dre hentoù boas ar gounezerezh, ar mager-ezh, ar pesketaerezh, an hemolc'herezh, ar greanterezh, e kemm ouzh ar bouedoù anvaziek evel ar re a zo enno proteinoù tennet eus ar bevedegoù unkellig.

alimentation artificielle ◇ **artificial alimentation** ◇ **boueta kalvezadel** Ebarzhiñ boued er forzhioù koazhañ diwar-bouez ur sont.

alimentation forcée ◇ **forced alimentation, forced feeding** ◇ **boueta dre redi** Euvriñ pe ober euvriñ boued en tu all d'ar c'hoant; graet e c'hell bezañ ayoul (emvoueta dre redi) pe a-zestrizh.

alimentation œsophagienne ◇ **boueta treizherel** Mod boueta kalvezadel diwar-bouez ur sont sanket dre ar fri pe ar genou, ar c'hargadenn hag an treizher betek ar stomok.

alimentation parentérale ◇ **extra-buccal feeding** ◇ **boueta lezkoazhadel, boueta ampervezel, boueta trewan** Ebarzhiñ maguzennoù dre sankañ, peurliesañ diwar-bouez trefennadoù.

alimentation rectale, lavement nutritif ◇ **rectal alimentation** ◇ **boueta youlc'hel** Mod boueta kalvezadel diwar-bouez ur sont sanket dre ar fraezh e-barzh ar youlc'h.

aliment-

- *aliment de lest* boued lastr • *comportement alimentaire* realezh emvagañ • *denrée alimentaire* danvez bevañs • *ingestion d'aliments* euvriñ boued • *protéines alimentaires* proteinoù boued, proteinoù mezhur • *substances alimentaires* danvezioù boued, danvezennoù mezhur.

alit-

- *malade alité ou ambulatoire* klañvour gweleat pe baleat.

allantoïde ◇ **allantois** ◇ **allantoid** g. Bogod diouzh ar pervez rizhellel a gendaol da furmiñ funig ar begel hag an dorzhienn.

allantoïde

- *diverticule allantoïde* bogod allantoidel.

1 2 allèle 2 gène alléomorphe, gène alléomorphique ◇ **allele** ◇ **1 allel** aa. **2 genenn** b. **allel, allelenn** b. Pep hini eus an div c'henenn o c'henniñ ul lokuz kevelep, o piaouañ an un arc'hwel met gant pep a weredoù kevarall.

allélognathie ◇ **allelognathia** ◇ **avengeidañ** Keñver etre kenfeurioù an div aven (sl. *articulé dentaire, dysallélognathie*).

allergène ◇ **allergen** ◇ **allergen** g. **-ioù** Nep danvezenn en araez da zec'han un erwezh allergek.

allergide ◇ **allergid** ◇ **allergid** g. **-où** Anvad rumm erzerc'hadoù kroc'hen an allergiezh.

allergie ◇ **allergy** ◇ **allergiezh** b. Nep daskemmad devoudet er bevedeg gant ar gwered warnañ eus un antigen, eleze eus un danvezenn ez eo kizidik outi ha ma erwezh outi diwar-bouez un antikorf (sl. *anaphyllaxie, immunité*).

allergique ◇ **allergic** ◇ **1 3 allergek** aa. **2 allergeg** g. **-eion** 1 Gant an allergiezh. 2 Gouziviad an allergiezh. 3 A-zave d'an allergiezh.

allergologie ◇ **allergology** ◇ **allergologiezh** b. Diskiblezh vezegel o plediñ gant an allergiezh.

allergologique ◇ **allergologic** ◇ **allergologek** A-zave d'an allergologiezh.

allergologue ◇ **allergologist** ◇ **allergologour** g. **-ion** Arbennigour war ar c'hleñvedoù allergek.

alliesthésie ◇ **alliaesthesia** ◇ **blizamzalc'h** g. Keflended etre ar bliz pe an divliz dec'hanet gant ur gentrigenn diavaez ha stad diabarzh ar gouzrec'h (gwrezverk, pouez, gwastadennoù bevedel diseurt).

allocinésie ◇ **allocinesia** ◇ **eiltuffiñv** g., **eiltuegezh** b. **ar fiñval** Strafuilh ar fiñval o c'hoarvezout a fiñval un ezel pa venner fiñval an ezel kemparzhek.

allocortex ◇ **allocortex** ◇ **allokorteks** g. An darn eus pluskenn an empenn, an henañ ent hildarzhel, ouzh he ober an arkeo-korteks hag ar paleokorteks.

alldynie ◇ **alldynia** ◇ **erlauriñ** Lauriñ o c'hoarvezout e ser un eraeziñ na vez ket laurus ent reol.

alloesthésie, allochirie ◇ **allochiria** ◇ **eiltuverzh** g., **eiltuegezh** b. **ar merzhout** Strafuilh ar steikiñ, ar gweled, ar c'hleved o c'hoarvezout a verzhout ur gentrigenn a-eiltu, eleze a-gleiz pa vez douget a-zehou hag a-c'hin.

allologique, homologue ◇ **homologous** ◇ **unspesadien** aa. O spizañ ur gwiaed pe un organ o tont eus un hinienn a unspesad hogen a c'henezh antigenel kevarall.

allogrefe, greffe allogénique, homogrefe, greffe homologue, homéogrefe, greffe homéoplastique, homoplastie, homotransplantation ◇ **homograft** ◇ **imboud** g. **unspesadien, unspesadimboud** g., **treuzplantadur** g. **unspesadien** Imboud etre hiniennoù a un spesad hag a c'henezh antigenel kevarall.

allong-

- *allongement du temps diastolique* uspad an diastol
- *allongement du temps expiratoire* uspad an ec'hanal
- *allongement et dilatation anormaux* hirded ha frankted ezreol, muiadur ezreol an hed hag al led, ushed hag usvoll
- *canal osseux allongé* kanol askornek hirvoan.

allopattie ◇ **allopathie** ◇ **allopatiezh** b. Mod mezegañ o vukañ da weredoù gin da re ar c'hleñved (sl. *homéopathie*).

allopathique ◇ **allopathic** ◇ **allopatek** aa. 1 O vukañ da weredoù gin da re ar c'hleñved. 2 A-zave d'an allopatiezh.

alloorhythmie ◇ **alloorhythmia** ◇ **arallgorvez** b. Anvad rumm eus migorveziou taoladek ar galon hag ar poulz.

allostérie ◇ **allosterism** ◇ **allosteregezh** b. Perzh gant proteinoù 'zo da zaskemmañ o neuziadur hag o gweredoù diwar zel-lanvad molekular bihan (*dewerc'herioù allosterek*) o tont da lenañ ouzh hanloadoù anezho (*hanloadoù allosterek*) hag oc'h enankañ arhentoù dezho; en doare-se e ve blivaet pe heudet an enzimoù.

allotriosmie ◇ **allotriosmia** ◇ **arallc'hwesa** Strafuilh ar c'hwesa, anezhañ merzhout c'hwezhiou kevarall d'ar re reol, da skouer klevout gant ar bara c'hwez ar c'hoad devet.

allotype ◇ **allotype** ◇ **askenrizheg** g. **-où, allotip** g. **-où** Immunoglobulin kevarall e naouusteroù spesadel hervez ar strolloù hiniennoù a un spesad.

allotypie ◇ **allotypy** ◇ **askenrizh** g., **allotipiezh** b. Bezañs munodoù kevarall e luniad an un protein gwadveizel etre hiniennoù a un spesad.

alogie ◇ **alogia** ◇ **ankomz** g. **amvredel** Ankomz oc'hazonañ an dilerc'hegezh vred muiek.

alopécie ◇ **alopecia** ◇ **diwaoutad** g. Kouezh ar blev, trumm pe bazennek, ganedigel pe arzeuat, lec'hiek pe strewek.

alopécie en aires, pelade ◇ **alopecia areata** ◇ **diwaoutad kantet, peliad** g. Dermatiz o tizhout ar parzhioù blevek, ar brigenn hag ar barv pergen, o naouiñ dre lec'hiennoù diwaoutad hevonn, arront, oc'h emdreiñ herrek hag o parañ dindan un nebeut mizioù.

alopécie en clairière ◇ **syphilitic alopecia** ◇ **diwaoutad frankizennek, diwaoutad sifilizek** Tachadoù bihan damzivlevet a-us hag a-dreñv an divskouarn, naoues d'ar sifiliz eilvedel.

alopécie liminaire frontale ◇ **alopecia liminaris** ◇ **diwaoutad gwrimennek an tal** Kouezh ar blev diouzh ur riblenn etre 1 ha 2 cm led war vevenn dal ar gwaout.

alopécie séborrhéique masculine, alopécie androgéno-génétique, calvitie hippocratique ◇ **male pattern alopecia** ◇ **diwaoutad soavredel ar baotred, diwaoutad androgenien, moalded hipokratek** Moaladur klok pe gloc'k'h kern ar c'hloppenn o teraoùñ gant ar c'hourevion yaouank, dezhañ div barenn bennañ : ar soavred hag ar raktued hêrezhel.

alphabloquant, alpha-inhibiteur, alphalytique ◇ **alphablocking** ◇ **1 alfadolc'her aa. 2 alfadolc'her g. -ioù** 1 O skoilhañ an adrenvuzerioù α. 2 Danvezenn alfadolc'her; alfadolc'herioù zo dezho ur gwered andiuzel (fentolamin, nikergolin), reoù all ur gwered diuzel, anezho ar gourzhalerioù α₁ (prazozin, moksizilit) pe α₂ (yohimbin).

alphanimétique ◇ **alphanimetic** ◇ **1 alfageveler aa. 2 alfageveler g. -ioù** 1 O werediñ evel an adrenvuzerioù α hag, en ur ster ledanoc'h, ouzh o nershaat. 2 Danvezenn alfageveler.

alphastimulant, alpha-adrénergique ◇ **alpha-adrenergic stimulating agen** ◇ **1 alfafraouaer aa. 2 alfafraouaer g. -ioù** 1 O vroudañ an adrenvuzerioù α. 2 Danvezenn alfafraouaer; alfafraouaerioù 'zo o deus ur gwered bloc'hel (an *adrenalin*, a zo ivez betafraouaer, an *noradrenalin* a fraoua an holl adrenvuzerioù α); reoù all zo ganto ur gwered diuzel, α₁ (ar *fenilefrin*) pe α₂ (ar *c'hlonidin*).

altér-

• *altération choroidienne de nature dégénérative* naoued dic'henezhadel an dolgensae • *altération d'une paroi cardiaque* naoued eus ur speur galon • *altération de la paroi aortique sus-sigmoïdienne* disleberadenn eus speur us-sac'hell an aortenn • *altération de la paroi artérielle* naoued eus speur an dalmerenn • *altération des hépatocytes* disleberad an hepatokit • *altération des voies optiques* tizhad er forzhioù gweled • *altération de la rétine, du nerf optique ou du cortex occipital* naoued al luc'hsae, an nervenn weled pe ar bluskenn gilpenn • *altération histologique* naoued gwiaudrel • *altération inflammatoire du canal cholédoque* anaf foel ar san vestl • *altération nucléaire* disleberañ ar graoñell • *altérations cardiovasculaires* disleberadoù kalongwazhiedel • *altérations d'organes* naouedoù en organoù • *altérer les propriétés organoleptiques* darallañ ar perzhioù merzhadennel • *anurie causée par une altération du rein* antroazh diwar naoued al lounezh • *granulocytes altérés* granulokit disleberet • *sans altérations oculaires visibles* hep naoued dinoadus en daoulagad • *substance altérant les mécanismes physiologiques* danvezenn o tireizhañ ar gwikefreoù bevedel.

altération ballonisante, dégénérescence ballonisante ◇ **ballooning degeneration** ◇ **dic'henezhadur g. gloevennus** Di-c'henezhadur ar c'helligoù epiteled naoues d'an dermatozioù diwar virus (eror, senkl, brec'h nij), ma revez kevret usvent ar c'helligoù, neuz sklaer o c'hitoplasmoù, kraoñelloù euzhek alies, alese furmidigezh ur gavenn glogorenek e-barzh an ezkroc'hen.

alternance électrique ◇ **electrical alternance** ◇ **pebeilad g. tredanel** Kenheuliad reoliek war ar c'halonvarrezad a gemplezhioù kofigel dezho heledoù kevarall.

alternance oculaire ◇ ◇ **pebeilad lagadel** Anadenn gant furmoù 'zo a loakrezezh (loakrezezh pebeilat) pa steud an daoulagad pep hini d'e dro diouzh an un ergorenn en ur chom digor an daou.

alterne : **paralyse** ~, **syndrome alterne** ◇ **alternate paralysis, alternate hemiplegia** ◇ **seizi g. dastuat, ledseizi g. dastuat, azoniad g. dastuat** Azoniad nerval, seizi peurliesañ, o c'hoarvezout a strafuilhoù diforc'h en eil ledkorf hag en egile : e tu an anaf, tizhadur un pe lies nervenn a-glopenn, en tu enep, tizhadur ar forzhioù hir (ledseizi, ledaneraez, ledazoniad ilpennel); er c'hef empenn e vez loet bepred anaf raklenat an azoniadoù dastuat, ha merket e vez live an anaf gant an nervenn a-glopenn tizhet

altern-

• *bain alternant* (Sz. *contrast bath*) kouronk pebeilat, kouronk dargemmus • *bloc de branche alternant* tolc'had barr pebeilat • *strabisme alternant* loakrezezh pebeilat • *syndrome alterne protubérantiel* azoniad dastuat pontel.

altitudinal

• *hémianopsie altitudinale* ledangwel diarez.

aluminose ◇ **aluminosis** ◇ **aluminoz g.** Analeuflegezh veinel fibroseiat a rumm ar silikatozioù, devoudet gant an dewntadur eus rannigoù a zo enno silikat alumin.

alvéole dentaire ◇ **dental alveolus** ◇ **logig b. -où dant** Kavenn askorn m'emañ ensteudet an dant.

alvéole pulmonaire ◇ **pulmonary alveolus** ◇ **logig skevent** Bolc'henn e dibenn ur gorrvronkezenn, unvez arc'hwelel ar skevent ma vez gwezhet an eskemmoù aezhennoù.

alvéolite ◇ **alveolitis** ◇ **logigfog.** 1 Tanijenn logigoù ar skevent, azonet gant ar vezañs en oaled al logigoù eus un naouezenn (logigfo naouezennus), eus kelligoù (logigfo makrofagek), eus fibrin (logigfo fibrinek) pe, pa vez pore, eus granulokit disleberet (logigfo linus). 2 Tanijenn ul logig dant goude an digewanañ.

alvéoloplastie ◇ **alveoloplasty** ◇ **logigatelviñ, askornatelviñ logigel** Azneuziañ surjaniel askorn al logig goude digewanañ an dant.

alvéolyse ◇ **alveolysis, alveoloclasia** ◇ **logigloez g.** Steuzidigezh un pe lies speur eus al logig, o tisoc'h en dibenn gant kouezh an dant.

alvéolite

- *alvéolite exsudative, suppurée, fibrineuse, œdémateuse* logigfo naouezennus, linus, fibrinek, gouliñvek.

alymphocytose ◇ **alymphocytosis** ◇ **alimfokitoz** g. Ezvezañs al limfokit.

alymphocytose congénitale ◇ **congenital alymphocytosis** ◇ **alimfokitoz ganedigal** Kleñved hêrezhel dibaot, anezhañ negez an ac'hadoù limfokit B ha T ha divigad an hangaeoù dourennel ha kelligel.

Alzheimer : **maladie d'~** ◇ **Alzheimer's disease** ◇ **kleñved** g. **Alzheimer** Furm baotañ eus an envedioù rakkozhiadel naouus *a*) ent neuziadurel dre isteñv pluskenn an empenn er parzhioù kitem-ivdig-kilpenn, anafoù ar pennmarc'hig ha bolc'hadur ar c'hambroù; *b*) ent wiadurel dre blakennoù kozhiadel ha dre zic'henezhadur an nervwianoù; *c*) ent klinikel dre un envedi vloc'hel gant disleberadur ar c'hounerezh, ezaouiñ amzerel-egorel, ankomez, andigon, andenaoud, ustant ampikernennek ha barradoù drouk-fell; dedreñ a ra d'ar fallezh ha d'ar marv dindan un nebeut bloavezhioù.

amaigrissement ◇ **emaciation** ◇ **treutaat, treutadur** g. Koll dreist 5 % eus ar pouez korf boas.

amalgame ◇ **amalgam** ◇ **amalgam** Kendeuzad bevergant, argant, staen, kouevr ha zink danvezet da varrañ ar c'havennoù dant.

amas

- *amas blanchâtre* hogennad arwenn
- *amas de cellules* tolpad kelligoù
- *amas de pus* hogennad lin
- *cellules amassées autour des vaisseaux* kelligoù tolpet en dro d'ar gwazhied
- *la réunion en amas de bactéries* an tolpañ e kalzennoù a vakteri
- *la réunion en amas de globules rouges* tolpadur ar c'helligoù ruz.

amastigote ◇ **amastigote** ◇ **anskourjez** aa., **amastigot** aa. A-zivout ar protozoed, hep skourjez.

amaurose ◇ **amaurosis** ◇ **steuzwel** g. Koll ar gweled hep naoued dinoadus en daoulagad

ambient

- *l'air ambient* aer an amva
- *l'éclairage ambient* ar gouloù en ardro
- *milieu ambient* amva
- *pression ambiante* amwask.

ambidextre ◇ **ambidextrous** ◇ **1 uezehouiat** aa. **2 uezehouiad** g. **-ed** 1 Ken ampart gant e zorn kleiz ha gant e zorn dehou. 2 Den uezehouiat.

ambigu ◇ ◇ **1 marrev** aa. **2 marrev** g. **-eion** 1 Gant parzhioù ganadel kammneuziet ken ne c'haller ket naouaat ar rev dre arseliñ an organoù diavaez ha diabarzh. 2 Hinienn varrev.

ambivalence ◇ **ambivalence** ◇ **amluskegezh** b. Bezañs daou gantaezad kevenep a-geñver d'un an derc'had, azon a skizofreniezh peurliesañ.

amblyopie ◇ **amblyopia** ◇ **bouc'hwel** g. Leiadur al lemmded weled hep naoued dinoadus en daoulagad, da ziforc'hiñ diouzh ar steuzwel a zo koll hollet ar gweled (sl. *amaurose*).

amblyopie

- *amblyopie crépusculaire* dallder noz, dallder amheol, dallder issked, bouc'hwel issked.

ambosexuel ◇ **ambisexual, ambosexual** ◇ **1 meskrev** aa., **meskrev** aa. **2 meskrev** g. **-eion** **3 meskrevel** aa. 1 Gant arouezioù gourevel ha benevel kevret. 2 Hinienn veskrev. 3 A-zave d'ar veskrev.

ambosexualité ◇ **ambosexuality** ◇ **1 meskrev** b., **meskrevegezh** b. **2 meskrevelezh** b. 1 Stad un hinienn veskrev. 2 Revelezh ma vez mesket arouezioù an div rev.

ambulance ◇ **ambulance** ◇ **klañvgarr** g., **ambulañs** b. Karrbed aveet da dreuzdougen gloazidi pe glañvourion.

ambulateur ◇ **walking frame device** ◇ **kerzherell** b. Ardivink arveret da barraat ouzh an andrafted vale, anezhañ ur stern prenn, mezell pe vetal gant peder garenn a-zerc'h etrezo barrennoù a-zremm war dri c'hostez, ar c'hlañvour o harpañ warnañ hag ouzh e gas a-rikl pe a-ruilh dirazañ.

ambulation ◇ **ambulation** ◇ **kerzhed** g., **kerzhadur** g. Ar bale pe an doare bale.

ambulateur ◇ **ambulatory** ◇ **1 1 baleat** aa. **2 balead** g. **-ed** **1 3 baleadel** aa. **2 baleata** pao. &aa. 1 1 Mezeget er c'hlañvdi hep bezañ klañvdi. 1 2 Gouziviad baleat; ent amaezel e Frañs, ar balead eo ar c'hlañvour herberc'hiet berroc'h amzer eget 24 h, e kemm ouzh ar c'hlañvour gweleat, a vez herberc'hiet ouzhpenn un devezh. 1 3 *a*) A-zave d'ar valeaded ha d'an obererezh war o zro, sk. : arouelioù baleadel; *b*) o kevaraezañ kerzhout, sk. : hentenn valeadel (sl. *méthode ambulatoire*). 2 Diwar an darlusk kleñvedel da gerzhout, sk. : diarzoug baleata (sl. *automatisme ambulatoire*).

amélie ◇ **amelia** ◇ **anezel** g. Ezvezañs c'hanedigal (ezelanpar) ar pevar ezel (sl. *ectromélie*).

aménorrhée ◇ **amenorrhoea** ◇ **mizanliñv** g. Ezvezañs ar mizioù gant ur vaouez en he hoal ganadel ha nad eo ket dougerez.

aménorrhée primaire ◇ **primary amenorrhoea** ◇ **mizanliñv kentael** Nazonedigezh ar mizioù gant ur plac'h yaouank degouezhet en oad ar gaezouegezh.

aménorrhée secondaire ◇ **secondary amenorrhoea** ◇ **mizanliñv eilvedel** Span ar mizioù gant ur vaouez bet miziaouet c'hoazh.

aménorrhée-galactorrhée : **syndrome** ~ ◇ **lactation-amenorrhoea syndrom** ◇ **azoniad** g. **laezhver-mizanliñv** Borc'hañ laezh hag ezvezañs ar mizioù hirbad gant ur vaouez goude gwilioudiñ pe hep keñver gant ar vrazedded, diwar ar reñver prolaktin.

amétropie ◇ **ametropia** ◇ **mistiwel g.** Anvad rumm direizhoù ar gouskogañ el lagad : isstiwel, usstiwel, mistiwel (sl. *myopie*, *hypermétropie*, *astigmatisme*, *emmétropie*).

amiante

- *poudre d'amiante* poultr asbest.

amibes ◇ **amoebae** ◇ **amoeb u.** Protozod eus renkennad ar Rizopod, urzh an Amoebianed, arvevat pe rezvevat.

amibiase ◇ **amoebiasis** ◇ **amoebiaz g.** Kleñved arvevatel diwar ur brotozoenn, *Entamoeba dysenteriae*, o trigañ er vouzellenn dev da gentañ hag o tevoudañ un darc'hoal gwadec (flus amoebel), o tiraec a-wechoù an avu, ar skevent, al lounezhi, ar felc'h, an empenn zoken hag o tec'han eno pugnezoù amoebel.

amibocytes ◇ **amoebocytes** ◇ **amoebokit s.** Kelligoù loenel pe struzhel heñvel o neuz hag o doareoù ouzh re an amoeb.

amiboïde ◇ **amoeboid** ◇ **amoebvanek aa.** Heñvel ouzh an amoeb.

amiboïsme, **amœbisme** ◇ **amoeboidism** ◇ **amoebvanegezh b.** Perzh a zo gant kelligoù 'zo er bevedeg (al leukokit) da astenn mardreid ha da zilec'hiañ evel an amoeb.

amibien

- *abcès amibien* pugnez amoebel • *dysenterie amibienne* flus amoebel.

amidon

- *glycérolé d'amidon* (*gel d'amidon dans la glycérine*) glikerolad ampez (gel ampez er glikerol).

amimie ◇ **amimia** ◇ **anveid g.** Digresk pe steuz ar meidiñ (jestroù ha dremmvezioù diarvenn ha diarzoug) emaez a bep anaez loc'hadel.

amimie motrice ◇ ◇ **anveid ec'hodiñ**, **anezluz g. meidel** Koll an eztaoliñ dre ar meidiñ, furm ankomz ezluzañ (sl. *aphasie de Broca*).

amimie musicale ◇ ◇ **sonanveid g.** Koll ar galloud da c'hoari ur benveg sonerezh.

amimie réceptive ◇ ◇ **anveid enodiñ**, **anenluz g. meidel** Koll intenterezh ar meidiñ, furm a ankomz enluzañ (sl. *aphasie de Wernicke*).

aminé : acide ~, **amino-acide** ◇ **aminoacid** ◇ **amindrenkenn b.** Anvad genadel ar c'hediadoù bevel o piaouañ kevret ur soaz amin ($-NH_2$) hag ur soaz trenkenn; kengediañ a ra an amindrenkennoù ha furmiñ peptid, elfennoù amparus d'ar proteinoù; 20 amindrenkenn a revez e proteinoù ar boued, 9 anezho ne vezont ket enaozet gant ar bevedeg, an amindrenkennoù bevret a reer anezho; renkañ a reer an amindrenkennoù etre ar re alifatek, hag ar re aromatek.

amino-acidémie ◇ **aminoacidaemia** ◇ **gwadvec'h g. amindrenkennoù** Feur an amindrenkennoù er gwad; etre 40 ha 80 mg/l eo ar feur bonan.

amino-acidopathie ◇ **aminoacidopathy** ◇ **amindrenkennaez g.** Anvad genadel ar c'hleñvedoù enzimatek naous dre strafuilhoù e kennevid an amindrenkennoù.

amino-acidurie ◇ **aminoaciduria** ◇ **1 troazhvec'h g. amindrenkennoù** **2 troazhusvec'h g. amindrenkennoù** 1 Feur an amindrenkennoù en troazh; etre 80 ha 210 mg anezho a vez ezvevennet ent vonan dre 24 h. 2 Muiadur kleñvedel eus ezvevennadur an amindrenkennoù dre an troazh.

aminosides ◇ **aminoglycosides** ◇ **aminoglikozid s.** Familh bevastalerioù dezho ur skalfad ledan o werediñ dre vreallañ hilvoneg ribozomou ar bakteri; pistriek int ouzh al lounezh ha, pa vezont diounezet ent ampervezel, ouzh organ ar c'hleved.

amitose, **division amitotique** ◇ **amitosis** ◇ **amitoz g.** Emrannañ eeun ar c'helligoù (amoeb, leukokit); ne vez ket dasparzhet ar c'hromozomou evel er mitoz ken e tisoc'h div graoñell verc'h digevatal.

ammoniémie ◇ **ammoniaemia** ◇ **gwadvec'h g. amoniak** Feur amoniak digraf er gwad; etre 12 ha 55 mmol/l er gwad gwazhiennel eo ar feur bonan; ar muiadur anezhañ (*gwadusvec'h amoniak*) a revez en ikteroù grevus hag er c'homa avuel; strafuilhoù koazhadel ha nerval grevus (*empennaoued avuel*, sl. *encéphalopathie hépatique*) a vez devoudet gant ar gwadusvec'h amoniak.

ammoniogénèse ◇ **ammoniogenesis** ◇ **amoniakparañ** Dilaosk amoniak dre ziaminadur eeun pe ameeun an amindrenkennoù.

ammoniophanèrese ◇ ◇ **amoniofanerez g.**, **amoniakparañ lounezhel** Dilaosk amoniak e gwiad al lounezhi diwar ar glutamin a zo unan eus furmoù kadav an danvezenn-mañ.

ammonurie ◇ **ammonuria** ◇ **troazhvec'h g. amoniak** Feur an amoniak ezvevennet dre an troazh, peurgetket er furm kloridenn; ent reol e vez ezvevennet etre 30 ha 50 mmol amoniak dre 24 h; dreist d'ar feur-se e komzer eus *troazhusvec'h amoniak*.

amnésie ◇ **amnesia** ◇ **ankoun g.** Anvad genadel strafuilhoù ar c'hounerezh, anezho diaested pe dic'halloud da enskrivañ (*enkounañ*), da zerc'hel (*argounañ*) ha da zaskoriñ (*daskounañ*) ar stlenn; kemm a lakaer etre an *ankounioù bloc'hel*, o tizhout holl rummoù merzhadel ar stlenn, hag an *ankounioù skiantennel*, dibaot, o tizhout ur rumm skiantennel hepken : an ankoun gwelout, an ankoun klevout; diforc'h a reer ivez an andaskoun eus an eñvoriou a-gozh (*ankoun diabellat*) hag an andaskoun eus an eñvoriou a-nevez (*ankoun dianesat*); dav eo notañ e vez ar c'hounerezh e dalc'h stad vevedel an empenn hag ivez levezonet gant dialusk breidel, kantaazel pergen, ar gouzrec'h : ar Vredoniezh a zeskriev an *ankoun hanbarus* pe *ekounañ* pe c'hoazh *ankoun darfellel*, ma 'z a ar gouzviad dieñvor ouzh prantadoù eus ar vuhez pe ouzh arveziou eus ar buhezadur.

amnésie immunitaire, amnésie immunologique ◇ **immunologic amnesia** ◇ **anvemor** b. **hangaeel** Ezvezañs ar vemor hangaeel : ar bevedeg ne furm ket antikorfoù, alese, e diouer difennoù, e c'hoarvez poreoù adfeilhus o kas ar vagadell d'ar marv.
amnésique ◇ **amnesic** ◇ **1 ankounek** aa. **2 ankouneg** g. **-eion** **3 ankounel** aa. 1 Gant an ankoun. 2 Gouziviad an ankoun. 3 A-zave d'an ankoun.

amnés-

- *ictus amnésique* orc'had ankoun.

amnestic ◇ **amnestique** ◇ **1 ankouneiat** aa. **2 ankouneiad** g. **-où** 1 O tevoudañ an ankoun. 2 Araez o tevoudañ an ankoun.

amniocentèse, ponction amniotique ◇ **amniocentesis** ◇ **ezwanañ an amnion, amnionezwanañ** Ezwanañ us-juntad an amnion war-benn studiañ doareoù al liñvenn amnionel ha dre se savelañ derez azvded ar grouell, derez gouzañvder ar grouell pa vez hangaeñ krouell-mamm, deznaouiñ ur gouskoevad kromozomel.

amniochoriale : poche ~ ◇ **amniochorial sac** ◇ **sac'h amnion-chorion** Kavenn anreol furmet dindan blein traoñ ar vi diwar un disfaout lec'hiek etre amnion ha korion, enni liñvenn amnionel.

amnioscopie ◇ **amniotomy** ◇ **amniotomie** Arselliñ al liñvenn amnionel a-dreuz d'ar c'hennenoù diwar-bouez un endoskop sanket dre wask ar grozh.

amniotique ◇ **amniotic** ◇ **amnionel** aa. A-zave d'an amnion.

amniotique : **brides** ~s, **maladie** ~, **complexe ADAM** ◇ **ADAM complex** ◇ **naskoù** l. (g.) **amnionel, kleñved g. amnionel, kemplezh** b. **ADAM** Naskoù stirek etre daou boent eus speur an amnion pe etre an amnion hag ar grouell; e devoud an ambidoù ganedigelezh e vent.

amniotite ◇ **amniotitis** ◇ **amnionfo** g. Tanijenn an amnion, arbenn gwirheñvel an amnionfoeñv hag an naskoù.

amœbicide ◇ **amoebicidal** ◇ **1 amoebiaz** aa. **2 amoebiazher** g. **-ioù** 1 A lazh an amoeb. 2 Lia arveret da brederiañ an amoebiaz; daou seurt amoebiazherioù a arverer : *a*) an *amoebiazherioù askignus* (pe a-ziastok), o chom e diastok ar benvegad koazhañ, gwezhus ouzh furmoù struzhek ha kistek an amoeb, ent arbennik ouzh an amoeb lavaret flusel; *b*) an *amoebiazherioù skignus* (pe gwiadell, a-ziabarzh), o tiraez diabarzh ar gwiadoù dre ar gwad, gwezhus ouzh an amoeb gwadezat pergen.

amœbome ◇ **ameboma** ◇ **amoebom** g. Yoc'henn foel kuñv dec'hanet gant an amoeb (*Entamoeba histolytica*) diwar goust glaourgenn ar c'holon.

amok ◇ **amok** ◇ **amok** g. Bredanaez stadet e Malaysia, kaouad feulster naouus dre an doug da lazhañ o c'hoarvezout goude ur skouldad gouvid.

amont

- *en amont d'une sténose incomplète* en argrec'h un isvroll leiek
- *en amont de l'obstacle* en argrec'h ar skoilh.

amorcer

- *amorcer une réponse immunitaire à un antigène* dehatiñ an erwezh hangaeel ouzh un antigen.

amorphe

- *substance amorphe* danvezenn anlun.

amovible

- *prothèse dentaire amovible* dentosod lamadus.

amorphognosie, agnosie d'extensité ◇ ◇ **andenaoud** g. **ar stummoù, andenaoud a-erdal** Koll ar galloud da hennadiñ ar stummoù dre ar stekiñ (sl. *ahylognosie, agnosie tactile*).

amotivationnel : syndrome ~ ◇ ◇ **migantoug** g. Azoniad o vodañ ar mineuzid (enkrez, brouezusted), an digasted kantaezel, ar gouvid hag an displeberad kefredel, o revout e dianlen an drammgaezhioù henek (sl. *athymhormie*).

amphétamine ◇ **amphetamine** ◇ **amfetamin** g. Amin simpatomimetek, diounezet dre ar genoù pe ent ampervezel; gwerediñ a ra war an nerved kreiz; blivaat ar brederc'hwelañ, ar c'hounañ, ar youliñ; leiaat santadur ar skuizhnez, ar c'hoant kousked, an naon; kentraouiñ kreizennoù an analañ ha muiaat ar gwask talmerel; estoueiad eo.

amphétamine : dérivés de l'~, amphétamines ◇ **amphetamines** ◇ **amfetamineier** l. (u. : **amfetamineg** g.) Rumm danvezennoù a zo o luniad kimiek kerentiet da hini an amfetamin ha ganto, e derez pe zerez, gweredoù heñvel.

amphicrine ◇ **mixed gland** ◇ **uevorc'hat** aa. A-zivout ur wagrenn a zo sez un ezvorc'hañ hag un enborc'hañ war un dro (an avu, an ilgreiz).

ampholyte ◇ **ampholyte** ◇ **uelezhid** g. **-où** Molekul a zo dezhañ soazioù trenkenn ha bazenn war un dro (proteinou, fosfolipid, amindrenkennoù).

amphophile ◇ **1 amphophilic** **2 amphophilous** ◇ **1 uelen** aa. **2 1 daougerc'h** aa. **2 2 daougerc'her** g. **-ioù** 1 A-zivout ur gedrann gellig krafus ken ouzh al livuzennoù trenkek, ken ouzh al livuzennoù bazek. 2 1 A-zivout un amprevan o flemmañ kenkoulz an denion hag al loened. 2 2 Amprevan daougerc'h.

amphorisme, souffle amphorique ◇ **amphoricity** ◇ **amforegezh** b. “Boud heñvel tre ouzh an hini a reer pa c'hwezher en ur garafenn pe en ur picher” (Laennec), a glever dre selaeouennañ ar bruskaezhad pe kavennou aezhel bras ar skevent.

amphotonie ◇ **amphotony** ◇ **ueüstant** g. Ustant o tarvezout war un dro gant an div reizhiad nervstruzhel, simpatek ha parasimpatek.

ampliation ◇ **ampliation** ◇ **dec'honiñ** Kresk mentoù ar brusk gant an enanalañ, ar c'hof gant ar vrazedded pe an torliñv.

amplificateur ◇ **1 amplifier** **2 enhancer** ◇ **1 amplaer** g. **-ioù** **2 herouezer** g. **-ioù** 1 Ardivink da vuiaat heled un arhent, naouus dre e savad hag e zraf. 2 Kemalad DNA en araez da gentraouiñ treuzskrivadur ur c'henenn (sl. **silencer**).

amplificateur de brilliance, amplificateur de luminance ◇ **intensifying screen** ◇ **skedamplaer** g. **-ioù** Ardivink arveret da dreuzfurmiñ ul lun gweledel en ul lun elektronek; er skinselliñ, da gemer ar skeudenn diwar ar skramm kendreluc'h ha d'he gwereañ war un hewel kresket enni sked ha dargemm.

ampliomètre thoracique ◇ **chest expansometer** ◇ **dec'honventer** g. **-ioù brusk** Ardivink muzuliañ amregad ar brusk e-kerz kor an anal.

ampli-

- *amplificateurs auditifs* amplaerioù kleved
- *amplifier* amplaat
- *amplitude articulaire* heled ar c'henvelloù
- *amplitude d'un signal* heled un arhent
- *amplitude d'une tension* heled ur barr
- *amplitude des pulsations artérielles* heled ar poulzadennoù talmerel
- *d'une amplitude inférieure à 300 µV* dindan 300 µV heled
- *limitation de l'amplitude articulaire* isheled ur c'henvell
- *limiter l'amplitude des mouvements articulaires* leiaat heled fiñvoù ar c'henvell.

1 ampoule, cloque **2 ampoule** ◇ **1 blister** **2 ampoule** ◇ **1 filhoc'henn** b. **1 2 klogorenn** u. 1 (sl. **bulle, phlyctène, vésicule**). 2 Endalc'her bihan o c'hoarvezout eus ur gorzenn wer beurgloz, enni un danvezenn liñvel pe hueek pe un dileizhad dishadenn arbaret da vezañ diounezet dre euvriñ pe dre ensinklañ.

ampoule de la trompe utérine ◇ ◇ **gloestr** g. **ar gorzenn grozh** Rann a 'r gorzenn grozh etre strizh ar gorzenn ha founilh ar gorzenn.

ampoule de Vater ◇ **ampulla of Vater** ◇ **gloestr avu-ilgreiz** Frankaenn en difourk e-barzh an daouzegenn eus ar san vestl hag ar san ilgreiz, oc'h amparañ kavenn greiz begenn vras an daouzegenn.

ampoule du canal déférent ◇ ◇ **gloestr ar san sper** Lodenn dibenn ar san sper, bolbosek ha frankaet dizingal.

ampoule galactophore ◇ ◇ **god** g. **laezhkaser** Frankaenn werzhidek war bep san laezhkaser a-raok he difourk e beg ar vronn.

ampoule rectale ◇ **rectal ampulla** ◇ **gloestr** g. **ar youlc'h** Rann frankaet ar youlc'h o tont diouzhtu goude ar c'holon sigma.

ampullome vatrien ◇ **Vater's ampulla carcinoma** ◇ **ampullom** g. **avuilgreiz** Kankr ar gloestr avu-ilgreiz.

amputation ◇ **amputation, dismembering** ◇ **ambidañ, ambid** g. **-où** Dilemel un ezel, un darn ezel pe ur parzh balirek (teod, calc'h, bronn).

amputé ◇ **1 amputated** **2 amputee** ◇ **1 ambidek** aa. **2 ambideg** g. **-eion** 1 Kollet gantañ un darn eus e gorf. 2 Gouziviad an ambidañ.

amput-

- *amputation du rectum* youlc'hezvenañ
- *amputation spontanée d'un orteil* ambid emdarzh ur biz troad
- *amputer qq. d'un organe* ambidañ un organ ouzh ub.

amusie ◇ **amusia** ◇ **anson** g., **sonanluz** g. Koll pe ezvezañ skiant ar sonerezh, ar gouzrec'h o vezañ divarrek da zenaout pe da haneilañ ur bomm sonerezh; a un natur eo gant an ankonz, o c'hoarvezout alies war un dro gantañ.

amusie motrice ◇ **motor amusia** ◇ **anson ezluzañ, sonanezluz** g. Dic'halloud da haneilañ un ton dre ar vouezh pe dre ur benveg.

amusie réceptive, amusie sensorielle, surdit  musicale ◇ **sensory amusia, musical deafness, tone deafness** ◇ **anson enluzañ, sonanenluz** g., **bouzarder sonerezhel, sonvouzarder** g. Dic'halloud da zenaout ar sonerezh.

amusique ◇ **amusic** ◇ **1 ansonek** aa. **2 ansoneg** g. **-eion ansonek** aa. 1 Gant an anson. 2 Gouziviad an anson. 3 A-zave d'an anson.

amygdale ◇ **tonsil** ◇ **hueg** g. **-où** Tolpad bolc'hennoù limfoidel kloz loet a) a-gleiz hag a-zehou war speur gostezel ar c'hargadenn, diouzhtu e diadrefñ strizh ar gorzailhenn, e-barzh god an huegoù (*huegoù ar stavn*), b) e-barzh gwiskad don glourgenn an teod e diadrefñ V an teod (*hueg an teod*), c) e rannbarzh kreizer bolz ar c'hargadenn etre daou wask ar c'horzennoù klevedel (*hueg ar c'hargadenn*).

amygdale du cerveau, amygdale c r belleuse ◇ **cerebellar tonsil** ◇ **hueg an ilpenn** Flipezenn eus an ilpenn loet a-gleiz hag e-zehou da hugenn ar flipezenn greiz, o c'holeiñ en daou du ar ouel vel adrefñ.

amygdalectomie ◇ **amygdalectomy** ◇ **huegezvenañ** Dilemel surjaniel an huegoù stavn en o fezh.

amygdalite ◇ **amygdalitis** ◇ **huegfo** g. Tanijenn lemm pe henek an huegoù stavn.

amygdaloïde : kyste ~ ◇ **amygdaloid cyst** ◇ **kist** g. **-où huegvaneke** Kist lez-gargadenn o c'hoarvezout a wiad limfoidel goloet gant un amwiskad epitekel.

amygdalotome, tonsillotome ◇ **amygdalotome** ◇ **huegezvener** g. **-ioù** Benveg arveret da ezvenañ an huegoù.

amygdalotomie ◇ **amygdalotomy** ◇ **huegenbenañ** Anvad lakaet war an huegezvenañ darnel.

amygdal-

- *amygdale linguale* hueg an teod • *amygdale palatine* hueg ar stavn • *amygdale pharyngée*, *amygdale pharyngienne* hueg ar c'hargadenn • *chancre amygdalien* livant an huegoù.

amylase ◇ **amylase** ◇ **amilaz** g. Enzim en halv pe e sug an ilgreiz o treluskañ dispenn an ampez e maltoz.

amylasémie ◇ **amylasaemia** ◇ **gwadvec'h** g. **amilaz**, **amilazwadvec'h** g. Feur amilaz er gwad, reol etre 30 ha 60 UI/l gwadveiz; amilazwadusvec'h a stader en ilgreizfo lemm.

amylasurie ◇ **amylasuria** ◇ **troazhvec'h** g. **amilaz**, **amilaztroazhvec'h** g. Feur amilaz en troazh, reol etre 35 ha 150 UI/l, keflen d'ar feur er gwad.

amyoïde : **substance** ~ ◇ ◇ **danvezenn** b. **amiloïdel** Protein ampezvanek harzus ouzh an enzimoù proteolitek, e rezh un danvezenn dreuzluc'hus, andileizh en dour, oc'h ensilañ an organoù hep o distummañ; ent luniadel ez eo angwiadek, bezant er gwad entremezel hag e saeoù ar gwazhied bihan.

amyoïdose, **amylose** ◇ **amyloidosis**, **amylosis** ◇ **amiloïdoz** g., **amiloz** g. Ensiladur danvezenn amiloïdel en organoù.

amylolytique ◇ **amylolytic** ◇ **ampezzannus** aa. O tourrannañ an ampez.

amylorrhée ◇ **amylorrhoea** ◇ **kaoc'hampezegezh** g. Feur ampez reñverek er c'haoc'h.

amyotrophie, **myotrophie** ◇ **amyotrophy** ◇ **1 kaherisvent** g. **2 kaheristeñv** g. 1 Anvad rumm an holl zigreskoù ec'honenn ar c'higennoù, ken diwar anafoù nerval, ken diwar an diloc'hekaat pe ur gwezheriañ. 2 Kaherisvent diwar dic'henezhadur ar c'haber.

amyotroph-

- *amyotrophie distale* kaheristeñv pellek • *amyotrophie* kaherisventek, kaheristeñvek.

amylorrhée ◇ **amylorrhoea** ◇ **glaurisvorc'h** g. Skorted borc'hañ ar glaour stomok.

anabolisant ◇ **anabolic** ◇ **1 ennevidus** aa. **2 enneviduzenn** b. 1 O reiñ lañs d'an ennevid, perzh piaouet gant an androgeiner pergen. 2 Lia ennevidus, peurliesañ un androgeneg kevanaoz, deveret diwar an testosterone.

anabolisme ◇ **anabolism** ◇ **ennevid** g. Treuzfurmadur ar boued e gwad bev, kentañ lankad ar c'hennevid.

anabolite ◇ **anabolite** ◇ **ennevidad** g. Danvezenn oc'h anadiñ e-kerz an ennevid.

anaclitique : **dépression** ~ ◇ **anaclitic depression** ◇ **gouvid** g. **gouskorel** Gouvid o c'hoarvezout gant ar vabaned laosket en dienez vamm; dec'han a ra un dilerc'hegezh vredloc'hadel hag azlammat war realezh an oad gour e rezh un diazveted kantaezel.

1 2 anacousie **1 cophose** ◇ **1 anacosis**, **anacousia**, **anakusis** ◇ **1 peurvouzarded** b., **anklev** g. **2 addiorren** ar **c'hleved**, **klevaddiorren** 1 Koll klok ar c'hleved. 2 Adarc'hwelekaat organ ar c'hleved.

anadémie ◇ **arreuziad** g. Darreuziad antredizhek; kinniget eo bet Gl. *anadémie* e 1960.

anaérobic ◇ **anaerobic** ◇ **1 anaervevat** aa., **anaerat** aa. **2 anaervevad** g. **-ed** **3 anaerat** aa. 1 A-zivout ur garveg na c'hell bevañ nemet e diouer an oksigen (anaerat ret) pe a c'hell bevañ ken e diouer, ken e diraez an oksigen (anaerat anret). 2 Garveg anaerat. 3 A-zivout an dazgweredoù kimiek, evel ar goadurioù, o c'hoarvezout e-maez diraez an aer.

anaérobiose ◇ **anaerobiosis** ◇ **anaerveved** g. Beved o c'hoarvezout en ur metoù hep oksigen.

anagène ◇ **anagen** ◇ **1 anagen** aa. **2 anagen** g. 1 A-zave da lankad kreskiñ ar blevgor. 2 Lankad kreskiñ ar blevgor (sl. *trichogramme*).

analbuminémie ◇ **analbuminaemia** ◇ **gwadanvec'h** g. **albumin** Feur mannel pe izel (*gwadisvec'h*) ar seromalbumin er gwad; ezreolder dibaot kenan, hêrezhel a greder, hep arouezioù klinikel pe d'ar muiañ naouus dre c'houliñvoù diwar an isgrenn onkotek.

analeptique ◇ **analeptic** ◇ **1 usreer** aa., **usreüs** aa. **2 usreer** g. **-ioù** 1 O kentraouiñ arc'hwelerezh reizhiadoù diseurt ar bevedeg. 2 Lia usreer.

analeptique

- *analeptique cardiovasculaire* usreer kalongwazhiedel, kalonusreer • *neuro-analeptique* nervusreer • *psycho-analeptique*, bred-usreer • *thymo-analeptique* noausreer.

analgésie ◇ **analgesia** ◇ **angost** g. Ezvezañs ar merzhout laur; lies gwikefre zo d'an angost : strafuilhoù nerval, gwered dieraezeroù, h.a.; ar furn hêrezhel (*angost ganedigel*) a zispleger dre un ezreolder en nervreizhiad emrennek.

analgésique ◇ **analgesic** ◇ **1 dic'hostus** aa. **2 dic'hoster** g. **-ioù** 1 O lemel pe o tistav al laur. 2 Lia dic'hostus.

analgésiques antipyrétiques ◇ **antipyretic analgesics** ◇ **dic'hosteroù enepertzhenn** Gwezherioù a zo dezho, ouzhpenn o ferzhioù dic'hostañ, gwered enep an derzhienn hag alies enep an danijenn.

analgésiques narcotiques ◇ **narcotic analgesics** ◇ **dic'hosteroù morzus** Gwezherioù a zo dezho, ouzhpenn o gwered enep laur, perzhioù hezañ, hevredañ, dienkreziñ; dec'han a reont asoc'h hag a-wechoù estoue; isreüs e vezont ivez war greizennoù an analañ.

analgésique

- *action analgésique* gwered dic'hostañ • *propriétés analgésiques* perzhioù dic'hostañ, dic'hostusted.

analgie ◇ **analgesia** ◇ **lauraneraez** g. Aneraez klok ouzh al laur.

analgnosie ◇ **laurandenaoud** g. Dic'halloud da zelec'hiañ al laur a eraezer ha da hennadiñ e natur; direizh o c'hoarvezout pa vez anafet an dolbezenn gitern.

analthymie ◇ **laurankantaez** g. Andeur ouzh ul laur, hag eñ eraezet, delec'hiet ha hennadet e natur.

analyse ◇ **analysis** ◇ **1 elfennañ, elfennerezh** g. **2 dezrannañ, dezrann** g., **dezrannerezh** g. 1 Dispartiañ ha hennadiñ an elfennoù a ya d'ober udb., sk.: *elfennañ ar gwad*. 2 Savelañ keñverioù diabarzh un ergorenn arseliñ pe devezout, sk.: *dezrannañ ur saviad*.

analyse(-)

• *analyse biochimique* elfennerezh bevgimiek • *analyse harmonique* elfennerezh dazuc'hadel • *analyse radiochimique* elfennerezh skingimiek • *analyse spectrale* elfennerezh skalfadel • *analyse statistique des mouvements des molécules* dezrann stadegel korzh ar molekul • *analyseur d'amplitude* elfenner heled.

anamnèse, anamnétiques ◇ **anamnesia** ◇ **hanezadur** g. Stlennadoù pourchaset gant ar c'hlañvour pe e dud nes war istor e gleñved (sl. *antécédents*).

anaphase ◇ **anaphase** ◇ **anafaz** g. Trede lankad ar mitoz naoues dre zizoubladur ha disrannadur ar c'hromozomoù hag an dilec'hiaour anezho etrezek bleinoù ar gellig.

anaphrodisiaque ◇ **anaphrodisiac** ◇ **1 anorgeteiat 2 anorgeteiad** g. -où 1 O tistav pe o lemel ar c'hoant revel. 2 Danvezenn anorgeteiat.

anaphrodisie ◇ **anaphrodisia** ◇ **anorged** g. Gwanded pe ezvezañs ar c'hoant revel.

anaphylactique ◇ **anaphylactic** ◇ **darwalladel** aa. A-zave d'an darwalladezh.

anaphylatoxine, anaphylotoxine ◇ **anaphylatoxin** ◇ **anafilatoksin** g., **danvezenn darwallvanel** Danvezenn en araez da ziaskañ un erwezh heñvel ent klinikel ouzh an erwezh darwalladel (erwezh darwallvanel, darwallvan); ensinklet dre ar wazhienn e tevoud ur bleuz marvus.

anaphylaxie ◇ **anaphylaxis** ◇ **darwalladezh** b. Kresk ar gizidigezh ouzh un antigen dec'hant gant ur c'heraez kentañ dre ensinklañ, dre euvriñ pe dre enanalañ (*keraez eraozus*), oc'h anadiñ da geñver un eil keraez (*keraez diaskus*) e rezh un erwezh (*an darwallad*) a zo en e furn c'hrevusañ ar bleuz darwalladel; arveret e vez a-wechoù *darwalladezh, allergiezh* ha *dreistkizidigezh* evel heñvelsterioù; treuzkaset e vez an darwalladezh d'ur bevedeg dieraoz dre ensinklañ outañ gwadvez ur bevedeg kizidikaet, an darwalladezh c'houzañvat eo; heñvelderioù zo etre an darwalladezh hag an hangae, an diforc'h eo e c'hoarvez an hangae eus un digresk kizidigezh ouzh an antigen goude ar c'heraez kentañ (sl. *immunité*).

anaphyla-

• *anaphylaxie passive* darwalladezh c'houzañvat • *accidents anaphylactiques* darvoudoù darwalladel • *choc anaphylactique* bleuz darwalladel • *choc anaphylatoxinique* bleuz darwallvanel • *réaction anaphylactique* erwezh darwalladel, darwallad.

anaplasie ◇ **anaplasia** ◇ **anaplaziezh** b. Argerzh hanweel ma koll drezañ ar c'helligoù un darn vras eus o doareoù piauvel hep gwiskañ neoazh un neuz rzhellel.

anarchie ventriculaire ◇ **ventricular prefibrillation** ◇ **antrevn** g. **kofig, rakkrehad** g. **kofig** Heuliad grezvarrek pe gendalc'hek lammou kalon, herrek ha direoliek, rezhienet gant ur barrwezd anreizhiadekadus (stad rakkrehadel).

anarchique

• *prolifération anarchique des cellules* neridigezh antrevnek ar c'helligoù.

anarthrie ◇ **anarthria** ◇ **anekvaot** g. Dic'halloud da gevaotañ, eleze da drevnañ fiñvoù organoù ar vouezh evit ec'hodiñ soniadoù; bonan e chom arc'hwelioù all al lavar: gouest e chom ar gouziviad da gompren pezh a glev pe a lenn, ha da skrivañ; devoudet eo an anekvaot gant bezañs un annon anafet e tachad ar gronn ferek.

anarthrique ◇ **anarthric** ◇ **1 anekvaotek** aa. **2 anekvaoteg** g. **3 anekvaotel** aa. 1 Gant an anekvaot. 2 Gouziviad anekvaotek. 3 A-zave d'an anekvaot.

anasarque ◇ **anasarca** ◇ **anzark** g. Gouliñv hollek er gwiad kelligaouek endan-groc'hen gant fennadoù er c'havennoù levr-gennek.

anasarque fœtoplacentaire ◇ **Schridde's disease** ◇ **anzark krouelltorzhienn** Gouliñv tolzennek ar vi a-bezh gant torliñv; anaez marvus ar grouell, devoudet peurliesañ gant an digempad krouell-mamm.

anaspadias ◇ **anaspadias** ◇ **anaspadiaz** g. Kammneuziad ar c'han troazh a zo e wask loet e talbenn kein ar vezenn pe ar c'halc'h.

anastomose ◇ **anastomosis** ◇ **1 dasforzhad** g. **2 dasforzhañ** 1 Kehentad kleñvedel pe surjanel etre div wazhiedenn, div lodenn eus ar ganol vezhur. 2 Gwezhañ surjanel un dasforzhad.

anastomose antipéristaltique ◇ **antiperistaltic anastomosis** ◇ **dasforzhañ ginamdonnek** Dasforzhañ div rann eus ar pervez e doare ma ve gindu an amdonnegezh etrezo.

anastomose isopéristaltique ◇ **isoperistaltic anastomosis** ◇ **dasforzhañ kevamdonnek** Dasforzhañ div rann eus ar pervez e doare ma ve kendu an amdonnegezh etrezo.

anastomose latérolatérale ◇ **side-to-side anastomosis** ◇ **dasforzhañ tu-ouzh-tu** Dasforzhañ div ganol pe daou organ dre o speurioù.

anastomose terminolatérale ◇ **end-to-side anastomosis** ◇ **dasforzhañ penn-ouzh-tu** Dasforzhañ organoù pe ganolioù dre stagañ penn an eil ouzh peur egile.

anastomose terminotermine ◇ **end-to-end anastomosis** ◇ **dasforzhañ penn-ouzh-penn** Dasforzhañ div ganol dre o fennegiñ.

anastomos-

• *anastomose gastrojéjunale, gastroduodénale* dasforzhañ kreuz-yunegenn, kreuz-daouzegenn • *création d'une anastomose* amparañ un dasforzhad, dasforzhañ • *très fins vaisseaux richement anastomosés en réseau* gwazhied munut kenetredasforzhet puilh e stumm rouedad.

anatomie ◇ **anatomy** ◇ **1 korfadur g. 2 korfadurezh b.** 1 Neuziadur korfoù ar bevion. 2 Skiant o studiañ neuziadur korfoù ar bevion.

anatomie pathologique, anatomopathologie ◇ **anatomopathology** ◇ **kleñvedouriezh b. neuziadurel, neuzkleñvedouriezh b., naouedouriezh b.** Studi arveziou neuziadurel ar c'hleñvedoù, eleze an daskemmoù devoudet er gwiadoù hag en organoù gant an argerzhioù kleñvedel; ent klasel edo div hentenn imbourc'h, korrselladel ha meurselladel e kerz an neuzkleñvedouriezh; aznevezet eo bet gant ar gelligouriezh, ar c'horrregskerezh elektronek, tiñverezh ar gwiadoù, ar wiadkimiezh, ar wiadenzimouriezh, an hangaeouriezh, an izotopoù skinoberiek.

anatomoclinique : méthode ~ ◇ ◇ **hentenn b. neuzklinikel** Hentenn studi ar stadoù kleñvedel diazezet war "arselladur an azonou pe an direizhoù en arc'hwelioù o kendegouezhout gant pep rumm direizhoù en organoù" (Laennec).

anatom-

• *anatomopathologique* neuzkleñveduriel, neuzkleñvedel • *anatomopathologiste* neuzkleñvedour • *anatomophysio-logique* neuzveveduriel, neuzvevedel • *base anatomique commune à toutes les localisations* diaz neuziadurel boutin etre an holl lec'hiadurioù • *défaut anatomique* si neuziadurel • *orifice anatomiquement normal* gwask bonan e neuziadur • *signes anatomopathologiques* arouezioù neuzkleñvedel • *structure anatomique disposée en forme d'enveloppe* luniad korfadurel stalet e stumm ur c'hologoenn.

anatoxine ◇ **anatoxin** ◇ **anatoksin g.** Toksin bet arwerc'het dre ar wrez hag ar formol, kollet gantañ e bistrigezh ha miret e berzhioù hangaeel.

anautogène ◇ **anautogenous** ◇ **anaotogen aa.** A-zivout ur moustik na c'hell dozviñ nemet goude ur vouetadenn wad.

ancillaire : étude ~ ◇ **ancillary trial** ◇ **desell g. argrennat** Da geñver amprouadur ul lia nevez, studi renet war un niver argrenn a zegouezhioù (lodek en un teskad amploc'h) evit spizañ poent pe boent.

ancrage

• *bague d'ancrage* envez eoriañ • *point d'ancrage de l'étrier de traction-extension* poent krap ar stleug sach-astenn.

androblastome ◇ **androblastoma** ◇ **androblastom g.** Yoc'henn ar glidenn diwar gelligoù Sertoli; dibaot eo ha kuñv; teir furm a zeskriver dezhi : *adenom pibellek Pick*, pibellek pe funellek e adailadezh, ar *furm strewek* (yoc'henn andiforc'hek ar blastem ganadel), ar *furm funellek* ma kaver douesadennoù kelligoù e stumm pibelloù ha funelloù.

androgène ◇ **androgen** ◇ **1 androgen aa. 2 androgen g. -où & -ier** 1 O tevoudañ dinodadur an eilarouezioù gourevel, o kaout ivez ur gwered usretis war an ennevid. 2 Lia androgen.

1 androgène : hormones ~s **1 2 androgènes** ◇ **1 2 androgens** ◇ **1 hormonou l. (g.) androgen 2 androgeneier l. (u. : androgene g.)** 1 Hormonou steroidel dezho 19 atomenn garbon, gant perzhioù androgen, enaozet ha borc'het gant ar glidenn, ar gaenuslouezhenn hag, a gementadoù bihan, gant ar vierrez. 2 Anvad rumm evit an hormonou androgen hag an danvezennoù kevanaoz a un gwered ganto; an androgeneier kevanaoz zo dezho perzhioù ennevidus hep gwered revel bras.

androgénèse ◇ **androgenesis** ◇ **1 androgenbarañ 2 gourevc'haniñ 3 androgenez g.** 1 Er Vevgimiezh, furmidigezh an androgeneier diwar ar c'holesterol; sez an androgenbarañ er bevedeg eo ar glidenn, ar gaenuslouezhenn hag ar vierrez. 2 Anvad rumm modoù diorreadur ar rizhell dindan delanvad ar c'hromozomoù gourevel nemetken (sl. *andromérogonie, gynogénèse, gynomérogonie, mérogonie*). 3 Diorreadur ur rizhell diwar ur spergellig reol a reer dezhi frouezhigiñ ur vigellig a zo bet distrujet ar c'hromozomoù enni.

androgénicité ◇ **androgenicity** ◇ **1 androgenegezh b. 2 androgenusted b. 3 androgenelezh b.** 1 Perzh un danvezenn da gaout gweredoù an hormonou androgen. 2 Perzh ur bevedeg da enaozañ (ha da zewezhiañ) hormonou androgen. 3 Dave d'an hormonou androgen.

androgénie ◇ ◇ **androgenvec'h g.** Feur an hormonou androgen er bevedeg (sl. *hyperandrogénie, hypoandrogénie*).

androgénique ◇ **androgenous** ◇ **1 androgenek aa. 2 androgenus aa. 3 androgenel** 1 O kaout gweredoù an hormonou androgen. 2 Oc'h enaozañ (hag o tewizhiañ) hormonou androgen. 3 A-zave d'an hormonou androgen.

androgénothérapie ◇ **androgenous therapy** ◇ **androgengurañ** Mezegadur dre an hormonou androgen.

androgynie, androgynóide ◇ **androgynoid** ◇ **androgenoid g. -ed** Gourev kelgellek ha neuziet ent venevek rann draoñ e venvegad genel.

- androïde, viriloïde** ◇ **android** ◇ **gourevvanek** aa. Gant doareoù neuziadurel ur gourev, pa vez anv dreist holl eus dasparzh ar gwiadoù kaherel ha behinel, sk. : *borlder gourevvanek*.
- andromérogonie** ◇ **andromerogony** ◇ **andromerogoniez** b. Diorreadur ur vi frouezhiget a zo bet digraket dioutañ ar pronukleüz benevel kent e uniedigezh gant ar pronukleüz gourevel (sl. *androgenèse, gynogenèse, gynomérogonie, mérogonie*).
- andrologie** ◇ **andrology** ◇ **gourevouriez** b. Arbennigiez vezegel o plediñ gant an anaezioù gourevel.
- andropause** ◇ **male climacteric** ◇ **eizikvan** b. **c'hourevel** Oad eizik ar baotred, erzerc'hadoù kreudel ha bredel o c'hoarvezout gant ar c'houreved etre 50 ha 70 vloaz (sl. *ménopause*).
- anémie** ◇ **anaemia** ◇ **amwad** g. Leiadur ar c'hementad hollel hemoglobin arc'hwelek war amred; amwad a zeznaouer pa vez ar gwadvec'h hemoglobin dindan 13 g/l gant ar gourev, dindan 11 g/l gant ar venev.
- anémie à hématies falciformes** ◇ **sickle-cell anaemia** ◇ **amwad hemati kornek** Furm amwad loezadel hêrezhel naouus dre un hemoglobin ezreol ha kelligoù ruz distreset e stumm kreskenn.
- anémie aplastique, anémie arégénérative** ◇ **aplastic anaemia** ◇ **amwad angweel, amwad isparadel, amwad anamsavadel** Furm amwad e dalc'h falladur an organoù gwadparañ, marvus war verr dermen.
- anémie ferriprive, anémie sidéropénique** ◇ **asiderotic anaemia** ◇ **amwad diwar olhouarn, amwad olhouarnel** Amwad diwar negez houarn (sl. *anémie hyposidérémique*).
- anémie hémolytique** ◇ **haemolytic anaemia** ◇ **amwad loezadel** Amwad diwar loezadur reñverek ar c'helligoù ruz.
- anémie hémolytique auto-immune** ◇ **autoimmune haemolytic anaemia** ◇ **amwad loezadel unanhangael** Furm amwad loezadel arzeuat diwar an enaozañ eus unanantikorfou krafus ouzh antigenoù an hemati.
- anémie hémolytique immunologique** ◇ **immunohaemolytic anaemia** ◇ **amwad hangaeloezadel** Furm amwad arzeuat ma vez distruj ar c'helligoù ruz e dalc'h gwered antikorfou spesadel ar gwadveiz, hag int unanien pe unspesadien.
- anémie hémolytique périnatale** ◇ **perinatal haemolytic anaemia** ◇ **amwad loezadel troc'hanel** Distruj hemati ar bugel a-raok pe goude e c'handedigezh devoudet gant an digempad krouell-mamm, anaez marvus d'ar bugel.
- anémie hyperchrome, anémie hyperchromique** ◇ ◇ **amwad uslivel** Amwad naouus dre isniver ar c'helligoù ruz hag an usvec'h hemoglobin enno.
- anémie hypochrome** ◇ **hypochromic anaemia** ◇ **amwad islivel** Amwad naouus dre an isvec'h hemoglobin er c'helligoù ruz.
- anémie hypochrome hypersidérémique** ◇ ◇ **amwad islivel houarnusvec'hel** Amwad naouus dre an isvec'h hemoglobin, dre usvec'h an houarn er gwadveiz ha dre vuiadur feur peurvec'hiañ an transferrin.
- anémie hyposidérémique** ◇ **hyposideremic anaemia** ◇ **amwad houarnisvec'hel** Amwad naouus dre an isvec'h houarn er gwadveiz; pa vez devoudet gant an olhouarn e vez isvec'hiek ar ferritin (< 110 µg/l); pa vez devoudet gant an danijenn e vez reol pe reñverek feur ar ferritin.
- anémie inflammatoire** ◇ **inflammatory anaemia** ◇ **amwad foel** Amwad houarnisvec'hel stadet e-kerz ar poreoù pe oc'h amheuliañ anaezioù foel henek diwar bore, remm pe gankr.
- anémie macrocytaire, anémie macrocytique, anémie mégalocytaire, anémie mégalocytique** ◇ **macrocytic anaemia** ◇ **amwad ruzusventel** Amwad gant kresk ec'honad keitat ar c'helligoù ruz.
- anémie mégaloblastique** ◇ **megaloblastic anaemia** ◇ **amwad megaloblastek** Amwad gant bezañs eritroblast usventek (megaloblast) er gwad.
- anémie microcytaire, anémie microcytique** ◇ **microcytic anaemia** ◇ **amwad ruzisventel** Amwad gant bezañs mikrokrit (kelligoù ruz dindan 80 µm³ ec'honad) er gwad amredat.
- anémie normochrome** ◇ **isochromic anaemia** ◇ **amwad helivel** Amwad naouus dre isniver an hemati, hag int reol o ec'honad hag o bec'h hemoglobin.
- anémie normocytaire** ◇ **normocytic anaemia** ◇ **amwad ruzheventel** Amwad gant hemati reol o ec'honad.
- anémie nutritionnelle, anémie carentielle** ◇ **nutritional anaemia** ◇ **amwad mivezhurel, amwad negezel** Amwad diwar ezvezañs an elfennoù ret d'ar gwadparañ, e dalc'h an negez houarn, proteinoù, vitaminoù, ar strafuilh er sugañ pe an ennevid anezho.
- anémie pernicieuse, anémie de Biermer, maladie de Biermer** ◇ **pernicious anaemia** ◇ **amwad yud, amwad Biermer** Kreuzfo isteñvel unanhangael o tevoudañ negez misugel ar vitamin B₁₂ ha, da heul, amwad uslivel ruzusventel olgwennel, melusniver ar megaloblast ha strafuilhoù nervel; marvus hep mezegadur, e vez pareet dre ar vitaminingurañ.
- anémie réfractaire** ◇ **refractory anaemia** ◇ **amwad kilvers** Skorted henek ar ruzparañ (hag ivez ar parañ granulokit ha trombokit) diwered outi nep mezegadur, anezhi alies ur stad rakleukemek.
- 1 anémie 1 2 3 anémique** ◇ **anemic** ◇ **1 amwadek 2 amwadeg** g. -eion **3 amwadel** 1 Gant an amwad. 2 Gouziviad an amwad 3 a-zave d'an amwad.
- anencéphalie, encéphalo-araphie** ◇ **anencephalia, anencephaly** ◇ **empennandlid** g. Andlid, eleze diouer serradur lodenn ar ganol arc'hnerveg keñverek d'an empenn.

- anencéphalomyélie** ◇ **amyelencephalia** ◇ **empennmelandlid** g. Furm vuiek ar mizlid empenn-mel, anezhañ diouer serradur an arc'hnerveg war e hed, eleze an nervahel en e bezh (sl. *encéphalomyélodysraphie*).
- anéphrique** ◇ **anephric** ◇ **1 anlounezhek** aa. **2 anlounezheg** g. **-eion** 1 Hep lounezh. 2 Hinienn hep lounezh.
- anergie** ◇ **anergia** ◇ **anergiezh** b. Steuz an allergiezh, eleze stad ur bevedeg kollet gantañ ar perzh da erwezhañ ouzh un allergen edo kizidik outañ diagent.
- anergique** ◇ **anergic** ◇ **anergek** aa. A-zivout ur gouziviad kollet gantañ e gizidigezh ouzh un allergen.
- anergisant** ◇ **anergic** ◇ **anergiezhus** aa. O tevoudañ an anergiezh.
- anesthésie** ◇ **anaesthesia** ◇ **1 aneraez** g. **2 dieraезиñ** 1 Ezvezañs pe koll an eraезиñ. 2 Lemel an eraезиñ e sell d'ur gwezh mezegel; kimiek e vez peurliesañ ar gwezherioù arveret.
- anesthésie caudale** ◇ **caudal anaesthesia** ◇ **dieraезиñ lostel** Ensinklañ un dileizhenn dieraезиñ e lodenn draoñ ar gavenn war-dev, kalvezder embreget e surjianerezh ar c'harbedenn hag en amiegouriezh.
- anesthésie de base** ◇ **basal anaesthesia** ◇ **dieraезиñ diazez** Rakwezheriañ muiek war-benn dec'han ar morgud ha parraat ouzh enkrez an dieraезиñ hag an oberata.
- anesthésie de contact** ◇ **surface anaesthesia** ◇ **dieraезиñ a-varr** Dieraезиñ lec'hiek graet dre arloañ an dileizhenn wezhus rageeun ouzh gorre ar glaourgenn (fric'hargadenn, briant, kornsae).
- anesthésie douloreuse** ◇ **anaesthesia dolorosa** ◇ **aneraez laurek** Lauruc'heraez en un tachad aneraezek.
- anesthésie en selle** ◇ **saddle block** ◇ **aneraez dibrek** Aneraez ar peñsoù, talbenn adreñv ar div vorzhed, ar c'harbedenn hag an organoù genel da heul un tizhad eus nervennoù al lost marc'h.
- anesthésie épidurale, anesthésie péridurale** ◇ **epidural anaesthesia** ◇ **dieraезиñ wardevel** Ensiklañ un dileizhenn dieraезиñ e lodenn pe lodenn ar gavenn war-dev hervez live ar gwezh surjanel, bruskel, dargreizel pe lostel.
- anesthésie générale** ◇ **general anaesthesia** ◇ **dieraезиñ hollek** Mod dieraезиñ o tevoudañ war un dro steuz an eraезиñ hag ar genskiant.
- anesthésie locale** ◇ **local anaesthesia** ◇ **dieraезиñ lec'hiek** Lemel ar santidigezh en un tachad bevennek dre ensinklañ pe difruañ an danvezenn wezhus.
- anesthésie régionale intraveineuse** ◇ ◇ **dieraезиñ parzhek engwazhiennel** Kalvezder o c'hoarvezout a ensinklañ un dieraезиñ e-barzh gwazhiennoù un ezel bet goulloet diwar-bouez ur vandenn Esmarch ha dalc'het goullo gant un anro hevolc'h.
- anesthésie régionale par bloc plexique** ◇ ◇ **dieraезиñ parzhek dre dolc'hañ plezhadel** Kalvezder dieraезиñ dre ensiladurioù en dro da wrizennoù plezhad ar vrec'h.
- anesthésie tronculaire** ◇ ◇ **dieraезиñ kefel** Kalvezder dieraезиñ dre ensinkladurioù en dro da gefioù navel an izili.
- anesthésier** ◇ **to anaesthetize** ◇ **dieraезиñ** Lemel an eraезиñ.
- anesthésiologie** ◇ **anaesthesiology** ◇ **dieraезиouriezh** b. Studi hag embreg an dieraезиñ, arbennigiezh vezegel.
- anesthésique** ◇ **anaesthetic** ◇ **1 1 aneraezek** aa. **1 2 aneraezel** aa. **2 1 dieraезиus** aa. **2 2 dieraези** g. **-ioù 2 3 dieraези-adel** aa. 1 1 Tizhet gant an aneraez, sk. : tachad aneraezek goude troc'h un nervenn. 1 2 A-zave d'an aneraez. 2 1 Gantañ perzhioù dieraезиñ, sk. : dieraезиus eo ar yenion. 2 2 Danvezenn arveret evit dieraезиñ, sk. : un dieraези eo an eter. 2 3 A-zave d'an dieraезиñ.
- anesthésiques généraux** ◇ **general anaesthetics** ◇ **dieraезиurioù hollek** Gwezherioù o tec'han an hun don, steuziadur an holl santerezhioù ha distenn an holl gigennoù; daou rumm zo anezho, an *dieraезиurioù aezhidik* pe *d. enanalañ* hag an *dieraезиurioù anaehidik* pe *d. sankañ*.
- anesthésiques locaux** ◇ **local anaesthetics** ◇ **dieraезиurioù lec'hiek** Gwezherioù a arloer ouzh ar gwiaed navel evit tolc'hañ an nervren ent eiltroüs; arloet e diastok kef un nervenn e tec'hanont seizi hag aneraez er parzhioù keñverek.
- anesthésiste** ◇ **anaesthesist** ◇ **dieraезиour** g. **-ion** Arbennigour war an dieraезиñ.
- anesthésiste** : **aide** ~ ◇ ◇ **addieraезиour** g. **-ion** Klañvidour arbennikaet war an dieraезиñ.
- aneuploïdie** ◇ **aneuploidy** ◇ **aneuploidiezh** b. Niver ezreol ar c'hromozomou, pe reñverek (*poliploidiezh, trizomiezh*), pe diouerek (*haploidiezh, monozomiezh*): an niver reol a lavarer *euploidiezh*.
- aneusomie** ◇ **aneusomy** ◇ **aneuzomiezh** b. Anvad rumm gwariadennoù kementadel ar c'hromozomou pe ar gen.
- anévrisme** ◇ **aneurysm** ◇ **darvoll** g. Yoc'henn wazhiedel hevonn, leun gant gwad liñvel, kaouledennoù trevnet pe get, diwanet war dreug un dalmerenn dre volc'hadur he speurioù, ha chomet kehent ganti.
- anévrisme artério-veineux, anévrisme artérioveineux** ◇ **arteriovenous aneurysm, arteriovenous fistula** ◇ **darvoll talmerenn-gwazhienn** Fic'h etre talmerenn ha gwazhienn, diwar zaraez peurliesañ, gronnet gant ur gwatoñv trevnet oc'h amparañ ar sac'h darvollel.
- anévrisme cirsoïde, anévrisme par anastomose, angiome rameux, tumeur cirsoïde, tumeur érectile pulsatile, varice artérielle** ◇ **cirsoïd aneurysm, branching aneurysm, racemose aneurysm, angioma arteriale racemosum, diffuse arterial ectasia** ◇ **darvoll teuc'hellek, angiom** g. **bodek, yoc'henn** b. **sonnidik talmus, teuc'hell** b. **dalmerel, usvoll** g.

talmerel strewek Yoc'henn wazhiedel diwar volc'hadur ha neradur antrevn un pe lies kef talmerel pe wazhiennel, oc'h amparañ ur c'hehentad talmerenn-gwazhienn ganedigel.

anévrisme disséquant ◇ **dissecting aneurysm** ◇ **darvonn diskejus** Godell diwanet e-barzh speur un dalmerenn war un hed bras pe vrasoc'h etre ar saeoù diabarzh ha diavaez diwar goust ar sae grenn da heul ur freg eus ar sae diabarzh.

anévrisme intracérébral ◇ **intracranial aneurysm** ◇ **darvonn ebarzhempenn** Kammneuziad sac'hek pe werzhidek, troadennek pe get, eus un dalmerenn empenn, dec'hanus da wadliñvoù pilhon pe pilhon-empenn.

anévrisme fusiforme ◇ **fusiform aneurysm** ◇ **darvonn gwerzhidek** Darvonn kranennek o c'hoarvezout eus bolc'hadur un dalmerenn, o chom kehent ganti dre e zaou benn.

anévrisme sacciforme, anévrisme sacculaire ◇ **saccular aneurysm** ◇ **darvonn sac'hek** Darvonn diwanet diouzh kostez un dalmerenn hag o chom kehent ganti dre ur mulgul.

anévrisme : faux ~ ◇ **false aneurysm** ◇ **gaouzarvonn g.** Yoc'henn wazhiedel e kefin un dalmerenn c'hloazet, diwar drevnadur ur gwatoñv a ya d'ober ur gaousac'h kehent gant an dalmerenn dre ur mulgul.

anévrisme ventriculaire ◇ **ventricular aneurysm** ◇ **darvonn ar c'hofig** Darvonn kostezel ar galon diwanet da heul un angwazhiad e kaher ar c'hofig, gant koll an argrezusted en tachad darvollek.

anévrismectomie ◇ **aneurismectomy** ◇ **ezvenañ an darvonn, darvollezvenañ** Dazbidañ un darvonn.

anévrismorrhaphie ◇ **aneurysmorrhaphy** ◇ **dlita an darvonn, darvoldlita** Anvad rumm ar c'halvezderioù surjaniel da brederiañ an darvolloù talmerel dre an hent engwazhiedel (sl. *endo-anévrismorrhaphie*).

anfractueux

• *plaie anfractueuse* gouli krouizek.

angéologie, angiologie ◇ **angiology** ◇ **gwazhiedouriezh b.** Skourr ar Vezekniezh o plediñ gant studi korfadurezh, bevedouriezh ha kleñvedouriezh ar gwazhied gwad ha limf.

angéite, angiite, vascularite, vasculite ◇ **angeitis** ◇ **gwazhiedfo g.** Tanijenn ar gwazhied.

angéite allergique, vascularite allergique ◇ **hypersensitivity angeitis** ◇ **gwazhiedfo allergek** Anvad rumm arveret da vodañ lies azoniad a zo boutin etrezo tanijenn ar gwazhied bihan (talmerennigoù, gwazhiennigoù, korwazhied) ha bezañs kemplezhioù hangaeel o c'houzediñ en endotelienn ar gwazhied (sl. *artérite temporale, périartérite noueuse*).

angiectasie ◇ **angiectasia** ◇ **usvoll g. gwazhied, gwazhiedusvoll g.** Bolc'hadur ur wazhiedenn.

angine ◇ **angina** ◇ **gorank g.** Tanijenn lemm eus strizh ar gorzailhenn o tizhout an huegoù hag alies ar gwaregoù hag ar ouel stavn; diforc'hiñ a reer, hervez neuz ar glaourgenn: ar *gorankoù eritematus*, ar *gorankoù yodek*, ar *gorankoù tonennek*, ar *gorankoù gouliezek*, ar *gorankoù marvennek*, ar *gorankoù c'hwezigennek*; hervez arbenn ar c'hleñved: ar *gorankoù erorel*, *senklel*, *diferek*.

angine de Vincent, angine ulcéromembraneuse ◇ **Vincent's angina** ◇ **gorank Vincent, gorank gouliezliennek** Seurtad huegfo goulemm, gouliezek, amlaurek; en naouezenn difteroidel o c'holeiñ ar c'houliez e laka ar c'horrgresker war wel fuzobakteri ha spiroket.

angine phlegmoneuse ◇ **phlegmonous angina** ◇ **gorank morferek** Anaez renket e-touez ar gorankoù, a zo en devoud ur pugnez pe ur morfer tro-hueg.

angine

• *angine couenneuse*, *angine pseudomembra-neuse* gorank tonennek • *angine diphtérique* gorank diferek • *angine érythémateuse* gorank eritematus • *angine herpétique* gorank erorel • *angine nécrotique* gorank marvennek • *angine pultacée* gorank yodek • *angine ulcéreuse* gorank angreizhek • *angine vésiculaire* gorank c'hwezigennek • *angine zostérienne* gorank senklel.

angio-encéphalographie ◇ **cerebral angiography** ◇ **gwazhiedluniñ an empenn, angiografiñ an empenn, angioenkefalografiñ** Skinluniñ gwazhied an empenn (talmerennoù, gwazhiennnoù, korwazhied) goude ensinklañ engwazhiennel un danvezenn demer ouzh ar skinoù X.

angiocardiogramme ◇ **angiocardiogram** ◇ **gwazhiedlunad g. ar galon, angiokardiogramm g.** Skinlunad graet dre an angiokardiografiñ.

angiocardiographie ◇ **angiocardiography** ◇ **gwazhiedluniñ ar galon, angiokardiografiñ** Skinluniñ kavennoù ar galon ha gwazhied bras diaz ar galon goude ensinkladur un danvezenn demer ouzh ar skinoù X er gwazhiennnoù pe er c'havennoù dehou dre ur sont engwazhiennel.

angiocardioscopie ◇ **angiocardioscopy** ◇ **kalonengweliñ, angiokardioskopiñ** Engweliñ kavennoù ha gwazhied ar galon diwar-bouez ur fibroskop.

angiocholécystite ◇ **angiocholangitis** ◇ **angiokolekistit g.** Tanijenn ar forzhioù hag ar gellenn vestl.

angiocholite ◇ **angiocholitis** ◇ **angiokolit g.** Tanijenn ar forzhioù bestl.

angiodysplasie ◇ **vascular dysplasia** ◇ **miwe g. ar gwazhied, gwazhiedviwe g.** Ezreolder gwazhiedel da heul ur gwariad a'n diorren.

angiofluorographie ◇ **angiofluorography** ◇ **angiofluorografiñ** Luc'hskeudenniñ deun al lagad goude ensinklañ engwazhiennel un danvezenn kendreluc'h, ar fluoreskein.

angiofluoroscopie ◇ **fluorescein angiography** ◇ **angiofluoroskopii** Ensinklañ engwazhiennel pe entalmerennel fluoreskein hag ensellout dindan gouloù Wood dinod kendreluc'h ar c'hroc'hen war-benn muzuliañ tizh amred ar gwad, priziañ lendalc'h al livuzenn e-barzh ar gwiadou hag andalañ talvoud an talmerennoù : mar bez dreist 20 sec padvezh dinod ar c'hendreluc'h er biz troad goude an ensinkladur er vorzhed e seller evel fall ar barr amred e talmerennoù ar c'har.

angiogenèse ◇ **angiogenesis** ◇ **gwazhiedparañ** Diwan ha diorreadur ar gwazhied.

angiographie ◇ **angiography** ◇ **gwazhiedluniñ, angiografiñ** Skinluniñ ar gwazhied goude ensinklañ un danvezenn demer ouzh ar skinoù X.

angiographie numérique, angiographie numérisée ◇ **digital angiography** ◇ **gwazhiedluniñ niverel, angiografiñ niverel** Araezad arselliañ ar gwazhied demeraet ma vez treuzfurmet ar skinlunad en ur skeudenn stlennegel bennozh d'ur skedamplaer.

angioïdes : stries ~ de la rétine ◇ **angioïd streaks of the retina** ◇ **skarroù l. (g.) angioïdel al luc'hsae** Ezreolderioù daoudu eus deun al lagad, anezho ur rouedad linennoù louet-sklent pe ruz-gwin o saezhenniñ en dro d'ar vegenn ha danlec'hiet da wazhied al luc'hsae; dedreñh a reont gorrek etrezek koll ar gweled.

angiolith ◇ **angiolith** ◇ **angiomvaen g.** Fetisád razek bezant a-wechoù e-barzh an angioemoù keviaouek.

angiomatose ◇ **angiomatosis** ◇ **angiomatoz g.** Kleñved hollek naouus dre an diwan eus angioemoù e lies lec'h, pe e gorre an amwiskadoù, pe e donder an organoù.

angiomatose hémorragique familiale, angiomatose héréditaire hémorragique, maladie de Rendu-Osler ◇ **Rendu-Osler-Weber disease** ◇ **angiomatoz hêrezhel gwadliñvus, kleñved Rendu-Osler-Weber** Anaez hêrezhel oc'h erzerc'hañ er vugeliezh, da azon nemetañ dezhañ ar fronwadoù betek 25 bloaz, oad ma krog angioemoù da ziwanañ war ar c'hroc'hen hag ar glaourgennoù, a zo sez da wadliñvadoù d'o zro; kevret gantañ e c'hell bezañ angioemoù er flugez ha darvolloù skevent.

angiome ◇ **angioma** ◇ **angiom g. -où** Kammneuziad hevonn e rezh ur gronnad gwazhied a'r gwad (*hemangiom*) pe a'limf (*limfangiom*) usweek hag usvolleek.

angiome cérébral ◇ **encephalic angioma** ◇ **angiom an empenn** Kammneuziad gwazhiedel e-barzh an empenn, an ilpenn pe ar mel, anezhañ ur c'hehentad etre ar reizhiadoù talmerel ha gwazhiennel hep etrebezañs korrwazhied.

angiome plan, angiome simple cutané, tache de vin, envie ◇ **capillary naevus, plans naevus, telangiectaticus naevus, portwine naevus** ◇ **angiom plaen, c'hoantaenn b.** Brizhenn glasruz ganedigel, o koll he liv p'he gwasker, andedrotis, anvezegadus.

angiome pulmonaire, anévrisme artérioveineux pulmonaire, fistule artérioveineuse pulmonaire ◇ **congenital arteriovenous aneurysm of the lung** ◇ **angiom ar skevent, fic'h g. talmerenn-gwazhienn skevent, darvoll g. talmerenn-gwazhienn skevent** Kehentad etre ur barr eus talmerenn ar skevent hag ur wazhienn a'r skevent dre ur fic'h eeun pe dre un tared angiomatus, oc'h amparañ un heptreug dehou-kleiz.

angiome sénile, angiome nodulaire, angiome cerise, tache rubis, perle sanguine papuleuse, télangiectasie papillaire ◇ **senile haemangioma, cherry haemangioma, papillary varix** ◇ **angiom kozhiadel, angiom kerezenn, brizhenn ruzvaen, korrwazhiedusvoll g. krugennek** Nozeleñ grenndoek 2–4 mm treuzkiz, ruz-kel, o hañvalout bezañ siket en derm, na goll ket he liv p'he gwasker, a stader alies war groc'hen ar c'hef gant an dud oadet.

angiomégalye ◇ **angiomégalye** ◇ **gwazhiedusvent g., keurwazhiedegezh b.** Muiadur ment ur wazhiedenn.

angionéphrographie ◇ **angioneurography** ◇ **gwazhied-luniñ al lounezh, angioneurografiñ** Skinluniñ gwazhied al lounezh goude ensinkladur un danvezenn demer ouzh ar skinoù X en aortenn.

angiopathie ◇ **angiopathy** ◇ **gwazhiedanaez g.** Anvad rumm klañvadurioù gwazhied ar gwad hag al limf.

angioplastie ◇ **angioplasty** ◇ **gwazhiedatelviñ** Gwezh surjanel da ratreañ speur ar gwazhied war-benn derezhañ o c'havnez, graet dreist holl war an talmerennoù (*talmerennatelviñ*).

angiopneumographie ◇ **angiopneumography** ◇ **gwazhied-luniñ ar skevent, angiopneumografiñ** Skinluniñ gwazhied ar skevent goude ensinkladur un danvezenn demer ouzh ar skinoù X dre ur sont ebarzhet dre ur wazhienn eus pleg an ilim betek ar wazhienn gav uhelañ; an un komenad eo hag evit gwazhiedluniñ ar galon.

angiorraphie ◇ **angiorrhaphy** ◇ **dlita gwazhied, gwazhied-dlita, angiorrafiñ** Krafaelañ ur wazhiedenn; dasforzhañ.

angiosarcome ◇ **angiosarcoma** ◇ **angiosarkom g.** Hanwe diwar elfennoù kenglenel ar gwazhiedoù gwad pe limf (*hemangiosarkom, limfangiosarkom*).

angioscanner, angioscanographie ◇ **angioscan** ◇ **gwazhied-erluniñ, angioskan g.** C'hwilerluniñ goude ensinkladur engwazhiennel an danvezenn dargemm.

angioscopie ◇ **angioscopy** ◇ **gwazhiedengweliñ, angioskopiñ** Erc'hwiliañ diabarzh ar gwazhied diwar-bouez ur fibroskop arbennik (*angioskop*).

angioscotome ◇ **angioscotoma** ◇ **angioskotom g.** Tachad dall bevennek al luc'hsae diwar skorted ur wazhiedenn.

angiospasme ◇ **angiospasm** ◇ **andag g. gwazhied, gwazhiedandag g.** Dargrezad ur wazhiedenn o tec'han un heskwad lec'hiek.

angiosténose ◇ **angiostenosis** ◇ **isvoll g. gwazhied, gwazhiedusvoll g.** Enkadur ur wazhiedenn.

angiotonomètre ◇ **angiotonometer** ◇ **angiotonometr** g. Ardivink da vuzuliañ ar gwask e talmerenn greiz al luc'hsae.

angio-

- *angio-endothéliome* angioendoteliom • *angioblastes* angioblast • *angioblastome* angioblastom • *angiodermite* angiodermite
- *angiogliome* angiogliom • *angiohémophilie* angiohemofiliezh • *angiome capillaire* angiom korrwazhiedel • *angiome caverneux* angiom keviaoek • *angiome stellaire* angiom steredenn • *angiome tubéreux* angiom sivienn • *angiomyome* angiomiom
- *angiotensine* angiotensin • *angiotensinogène* angiotensinogen.

Angle : **classification d'~** ◇ **Angle's classification** ◇ **rummadur** g. **Angle** Rummadur ar migeharzoù hervez kengeñver ar c'hildent kentañ.

angle alpha ◇ **alpha angle** ◇ **korn** g. **alfa**, **korn** α 1 (Kalon) korn luniet e-barzh tric'horn Einthoven gant an tredanahel keitad eus QRS hag an diazremm. 2 (Lagad) korn luniet gant luc'hahel al lagad (ahel mentoniell na zegouezh ket gant ar rioul greiz) hag ar gwelahel (regenn pennet er poent steudañ hag er rioul greiz).

angle d'anomalie ◇ **angle of anomaly** ◇ **korn ezreolder** Diforc'h, dewerzh e derezioù pe e diopriou, etre ar c'horn ergorel hag ar c'horn dangorel stadet el loakrerezh, eleze pa vez migenglot etre al luc'hsaeoù ; mannel e vez e tro an hegnglot.

angle gamma ◇ **gamma angle** ◇ **korn gamma**, **korn** γ Korn luniet gant luc'hahel al lagad hag ar steudahel (regenn pennet er poent steudañ hag e kreiz c'hwelañ al lagad).

angle kappa ◇ **kappa angle** ◇ **korn kapa**, **korn** κ Korn luniet gant gwelahel al lagad hag ar mabahel (serzhenn da greiz ar mab lagad).

angle objectif, **angle strabique** ◇ **squint angle** ◇ **korn ergorel**, **korn loakriñ**, **korn loakriñ ergorel** Korn luniet gant an daou welahel el loakrerezh.

angle subjectif ◇ **subjective squint angle** ◇ **korn dangorel** Korn merzhout pa vez migenglot etre al luc'hsaeoù.

angle : **syndrome de l'~** ◇ **Cushing's syndrome** ◇ **azoniad ar c'hogn pontilpenn**, **azoniad Cushing** Teskad an azonou devoudet gant ar yoc'hennou sezet e poull adreñv ar c'hlopenn en aspleg etre ar pont hag an ilpenn.

angle, angul-

- *angle externe ou interne de l'œil* ank diavaez pe diabarzh al lagad • *angle externe ou interne des paupières* ank diavaez pe diabarzh al lagad, freilh diavaez pe freilh diabarzh ar malvennoù • *angle solide* ec'hongorn • *angles alvéolaires* kognoù al logigoù
- *cheilite angulaire* gweuzfo ar freilhoù • *petite puce à front anguleux* c'hwen bihan gant un tal silhek • *voir X sous un angle d'une minute d'arc* kaout war X ur gavael ur munud.

angoisse ◇ **anxiety**, **anguish** ◇ **enkrez** g. Stad askre a zeskriver evel santad moustrus ur gourdrouz, hogen evel pep keal diazez ne gav an enkrez despizadur ebet ; aozerion c'hallek 'zo, heuliet gant aozerion saoznek, a laka kemm etre div furm : *anangoisse* ma sour an azonou kreudel (amwask ar c'harloc'henn hag ar bruched, keflusk kalongwazhiedel, koazhadel hag analadel) hag an *anxiété* ma ren an azonou bredel (nec'h, anken, ankalez).

angor, **angor pectoris**, **angine de poitrine**, **sténocardie** ◇ **angina pectoris**, **angina cordis**, **breast pang**, **sternalgia**, **sternodynia**, **stenocardia**, **orthopnoea cardiaca** ◇ **kevenkez** g., **kevenkez bruched**, **kevenkez kalon**, **kalonank** g., **glaz** b. **kalon**, **bruskost** b., **brennidost** b. Laur lec'hiet peurliesañ a-dreñv ar glerenn, amwaskus hag enkrezus gant anglevad ar marv kevogos, o saezhenniñ war-du an ezel krec'h kleiz, ar c'haved hag ar c'hein, diasket gant ar striv (ar c'herzhed pergen) pe ar from, distanet buan gant ar paouez pe an trinitrin ; azonus eo d'un heskwad er c'haer kalon diwar skorted ampoentat ar c'has kurunerel e-skoaz ezhommoù gremm ar c'haer kalon.

angor d'effort ◇ **effort angina** ◇ **kevenkez strivañ** Kevenkez dec'hanet gant ar strivañ, o rediañ da baouez hag o steuziañ pa baouezer, e kemm ouzh ar c'hevenkez emdarzh o c'hoarvezout e-maez a amveziadoù diaskañ.

angor de décubitus ◇ **decubitus angina** ◇ **kevenkez gourvez** Barradoù kevenkez o c'hoarvezout ent emdarzh en noz pa vezer gourvezet, o padout hiroc'h eget ar barradoù kevenkez strivañ ; alies e vezont ar ragazon eus kevogoster un angwazhiad a 'r c'haer kalon.

angor de Prinzmetal, **angor type Prinzmetal**, **syndrome de Prinzmetal** ◇ **Prinzmetal's variant angina pectoris** ◇ **kevenkez Prinzmetal** Furm kevenkez kalon e rezh barradoù laurioù grizias, emdarzh, hir, o c'hoarvezout lies gwech bemdez ; naouus er c'halonvarvezad dre un dreistuheladur muiek ha dibad eus an arroud ST ; ur wech diwar deir e tedro ar furm-mañ d'un angwazhiad a 'r c'haer kalon.

angor intestinal, **angor abdominal**, **ischémie intestinale paroxystique** ◇ **intestinal angina** ◇ **kevenkez pervez** Laur kof e rezh ur c'haz pe ur sparl, diouzhtu goude ar predoù, a-geñver gant skorted henek an eroueriañ e tachad talmerenn uhelañ ar gandedenn ; dre e zistro reliek e tegas ar gouziviad da zioueriañ boued ; en degouezhioù grevus e tedro d'ar fallezh pe d'ar marv diwar angwazhiad ar pervez.

angor intriqué ◇ ◇ **kevenkez kemmesk** Kevreted laurioù koazhadel pe vellennel ha kurunerel.

angor névrosique ◇ ◇ **kevenkez neurozek** Barradoù o c'hoarvezout a laurioù argalonel, a c'harmoù hag a grenoù, goude ma 'z eo bonan ar galon.

angor réflexe ◇ ◇ **kevenkez damougek** Kevenkez diwar an azlamm war blezhad ar galon hag an talmerennoù kuruner bonan eus ul laur a-vaez kalon.

anguillulose, strongyloïdose ◇ **strongyloidiasis** ◇ **anguilluloz** g., **strongiloidoz** g. Teskad an erzerc'hadoù kleñvedel, peurgetket koazhadel, dec'hanet en den gant an Anguillul pe Strongiloid, arvevaded eus urzhad an Nematod.

anhidrose, anidrose ◇ **anhidrosis** ◇ **c'hwezanvorc'h** g. Ezvezañs ar borc'hañ c'hwez.

anhidrotique ◇ **anhidrotic** ◇ **1 c'hwezanvorc'hek** aa. **2 c'hwezanvorc'heiat** aa., **enepc'hwez** aa. **3 c'hwezanvorc'h-eiad** g. -où, **enepc'hwezeg** g. -eier **4 c'hwezanvorc'hel** aa. 1 Gant ar c'hwezanvorc'h. 2 O tevoudañ ar c'hwezanvorc'h. 3 Danvezenn o tevoudañ ar c'hwezanvorc'h. 4 A-zave d'ar c'hwezanvorc'h.

anhiste ◇ **anhistic** ◇ **angwiadek** aa. Hep luniadezh kelligel.

anhydration ◇ **anhydration** ◇ **douranvec'h** g. Ezvezañs dour en ur metoù, en ur c'horf; da ziforc'hiñ diouzh an *dourisvec'h* (sl. *déshydratation*).

anicterique ◇ **anicteric** ◇ **anikterek** aa. Hep ikter; adany o spizañ an anaezioù avu na sav ket ganto ar gwadvec'h bilirubin dreist 20 mg/l.

anim-

• *présent dans certains tissus animaux* bezant e gwiadoù loenel 'zo • *transmis par les produits animaux* treuzkaset dre an dedaoladoù loenel • *utiliser les muscles et les tendons restants pour animer une prothèse adaptée* korvoañ ar c'higennoù hag ar stirenoù a chom evit kefloc'hañ un erstedell azasaet.

aniridie ◇ **aniridia** ◇ **ankanevedenn** g. Ezvezañs c'hanedigel ar ganevedenn.

aniséiconie ◇ **aniseikonia** ◇ **ankeitskeudenn** g. Ankeitvent ar skeudenoù merzhet gant pep hini eus an daou lagad.

anisochromie ◇ **anisochromia** ◇ **ankeitliv** g. Ankeited livadur ar c'helligoù ruz arwerc'het dre galvezder May-Grünwald-Giemsa, naous d'an ankeitvec'h hemoglobin.

anisocorie ◇ **anisocoria** ◇ **ankeitvab** g. Ankeitvent an daou vab lagad.

anisocytose ◇ **anisocytosis** ◇ **ankeitkellig** g. Ankeitvent ar c'helligoù ruz pe ar c'helligoù gwenn.

anisométrie ◇ **ankeitvent** g., **ankeited** aa. Dibarder ment (etre ar c'helligoù ruz peurliesañ).

anisométrie axiale ◇ **anisometropia** ◇ **ankeitstiwel** g. Dibarder ar stiegezh etre an daou lagad.

anisométrie axiale ◇ **ankeitstiwel ahelel, ankeidahel** g. Ankeitstiwel diwar dibarder ahelioù an daou lagad.

anisométrie réfractive ◇ **ankeitstiwel gouskogel, ankeitgouskog** g. Ankeitstiwel diwar dibarder ar gouskogañ etre an daou lagad.

anisophorie ◇ **anisophoria** ◇ **ankeitskeudenn eilvedel, anizoforiezh** b. Ankeitvent ar skeudenoù merzhet gant pep hini eus an daou lagad o c'hoarvezout goude dereizhañ an ankeitstiwel.

anisosphmygmie ◇ **anisosphymia** ◇ **ankeitpoulz** g. Ankeited heled ar poulzadennoù hep direizh en o c'horvez.

anite ◇ **proctitis** ◇ **fraezhfo** g. Tanijenn kanol ha ribl ar fraezh.

ankyloblépharon ◇ **ankyloblepharon** ◇ **arundiñv** g. **ar malvennoù, malvennarundiñv** g., **ankiloblefaron** g. Soutadur ganedigel, darnel pe hollel, ar malvennoù.

ankylochélie ◇ **ankylochilia** ◇ **arundiñv an divweuz, gwezarundiñv, ankilokeiliez** b. Soutadur a-zarvoud an divweuz hep enloezad, hep glenadur ouzh an divaven.

ankyloglossie ◇ **ankyloglossia** ◇ **teodarundiñv** g., **ankiloglosiez** b. Glenadur siek an teod, ganedigel pe arzeuat.

ankylorrhinie ◇ **anchylorrhinia** ◇ **fronarundiñv** g., **ankilorrhinez** b. Glenadur etre speurioù an divfron.

ankylose ◇ **ankylosis** ◇ **tromaot** g., **ankiloz** g. Leiadur pe steuziadur, kleñvedel pe surjaniel, al loc'hañ gant ur c'henvell heloc'h ent vonan.

ankylose dentaire ◇ **tooth ankylosis** ◇ **tromaot an dent** Kenintradur etre an askorn, an diraskorn hag en dentin o tevoudañ steuziadur stagelloù en amzantenn.

ankylose stapédovestibulaire ◇ **stapedial ankylosis, stapes fixation, stapedo-vestibular ankylosis** ◇ **tromaot stleug-rakkamb** Koll an arloc'h gant diaz ar stleug a-barzh prenestr ar rakkamb da heul ar c'hlaviañ, dre askornaat peurliesañ, eus ar stagell walennek, anaf o tevoudañ an isklev.

ankylosé ◇ **1 tromaotek** aa., **klaviet** aao. **2 strumet** aao., **sonnet** aao., **skoulmet** aao., **skoulmek** aa., **bav** aa., **kropet** aao. 1 A-zivout ur c'henvell kollet gantañ al loc'hañ diwar gleñved pe dre ur gwezh surjaniel. 2 A-zivout un ezel pe ur c'henvell a zo bec'h gantañ o loc'hañ (geriennoù eus ar yezh voutin hep arver el lavar mezezel resis).

ankyloser ◇ **to ankylose** ◇ **tromaotañ, klaviañ** Leiaat pe melmel heloc'h ur c'henvell, dre un argerzh kleñvedel pe dre ur wezh surjaniel (en degouezh-mañ diwezhañ ober dreist holl gant *klaviañ*).

ankylos-

• *la résection articulaire consiste à retrancher les extrémités des os en vue de provoquer l'ankylose de l'articulation* dazbidañ ur c'henvell zo troc'hañ kuit pennoù an eskern a ya d'e ober evit e lakaat da dromaotañ • *spondylarthrite ankylosante* mellenmarzfo tromaotus.

anneau, annul-

• *anneau de striction* gwalenn dag • *anneau orificiel* gwalenn ar gwask • *chromosome en anneau* kromozom gwalennek • *fibrose annulaire* fibroz gwalennek.

annexectomie ◇ **annexectomy** ◇ **adkrozhezvenañ** Dilemel an adkrozh diouzh un pe an daou du.

annexes ◇ **appendages, annexa** ◇ **adparzhioù** l. (g.) Organoù stag ouzh un unvez sellet evel pennañ.

annexes de l'utérus ◇ **uterine appendages, adnexa uteri** ◇ **adkrozh b., adparzhioù ar grozh** Organoù stag ouzh ar grozh (vierz, korzenn ar grozh, stagell ledan).

annexes embryonnaires, annexes fœtales ◇ **fetal appendages, fetal adnexa** ◇ **adkrouell b., adparzhioù l. (g.) ar grouell** Teskad ar furmadurioù (amnion, allantoid, torzhienn, kellenn vegetal) a dalveze d'an darempredoù mamm-krouell, ez-vevennet d'ar c'hanedigezh.

annexiel ◇ **annexial** ◇ **adkrozhel** aa. A-zave d'an adkrozh.

annexite, salpingo-ovarite, oophorosalpingite, tubo-ovarite ◇ **salpingo-ovaryitis** ◇ **adkrozho g., korzennvierzfo g.** Tanijenn gevret ar vierz ha korzenn ar grozh.

annexite respiratoire ◇ **adkavennfo g., adparzhfo g. (analadel)** Tanijenn ar c'havennoù kehent gant ar fric'hargadenn (korzenn glevedel, skouarn grenn, kevioù lez-fri).

annex-

• *cavités aériennes annexées à l'oreille moyenne* aergavennoù stag ouzh ar skouarn grenn.

annulocytes ◇ **annulocytes** ◇ **annulokit** s. Eritrokit dezho neuz ur walenn dre berzh an dargemm etre o c'hreizparzh re sklaer hag o zrobarzh, naous d'an amwadoù islivel eizhañ.

annuloplastie ◇ **annuloplasty** ◇ **gwaskatelviñ** Gwezh surjaniel amkanet da barraat ouzh ur silc'had en ur gwask eus ar galon dre c'houzelviñ gwalenn ar gwask diwar-bouez un osod pe hep osod.

anodontie ◇ **anodontia** ◇ **andent** g. Ezvezañs an holl pe hogos an holl dent.

anoestrus ◇ **anoestrus** ◇ **andar** g. Ezvezañs hollel an dargor.

anomalie

• *angle d'anomalie* korn ezreolder • *anomalie anatomique* ezreolder korfadurel • *anomalie caryotypique* gwariadenn ar genrizh • *anomalie congénitale* ezreolder ganedigez • *anomalie de développement* gwariadenn an diorren • *anomalie de l'appareil phonateur* direizh er benvegad mouezhparañ • *anomalie de l'hémostase* strafuilh er gwadkaeañ • *anomalie du message héréditaire* gwariadenn ar c'hemenad hêrezhel • *anomalie vasculaire* ezreolder gwazhiedel • *anomalies quantitatives des chromosomes* gwariadennoù kementadel ar c'hromozomoù • *anomalies squelettiques constitutionnelles* kammneuziadoù genezhel an eskern.

anomaloscope ◇ **anomaloscope** ◇ **anomaloskop** g. Ardivink optikel evit studiañ merzhadur al livioù.

anomie, aphasie anomique ◇ **anomia** ◇ **ankomz g. deanviñ, andeanv g.** Koll ar galloud da reiñ o anvioù d'an traoù a verzhher.

anonychie ◇ **anonychia** ◇ **anivin** g. Ezvezañs c'hanedigez an ivinoù.

anophèles ◇ **anopheles** ◇ **anofel** s. Moustiked gougevret ouzh ar genad *Anopheles*.

anophélisme, culicidisme ◇ **anophelism** ◇ **anofelegezh** b. Bezañs anofel en ur vroezenn.

anopsie ◇ **anopsia** ◇ **andrell** g. Span tremeniat ar gweled; anadenn o c'hoarvezout diwar ar c'hwimmoù bras, sk. : *andrell ar c'hwimm* gouzañvet gant an nijerion, an egordeerion.

anorchidie ◇ **anorchidia** ◇ **1 anklidenn g. 2 kellanvorc'h g.** 1 Ezvezañs c'hanedigez unan pe an div gell. 2 Ezvezañs hollel an enborc'hañ gant an divgell.

anorexie, inappétence ◇ **anorexia, inappetence** ◇ **anilboued** g. Koll pe digresk an ilboued.

anorexie mentale, anorexie psychogène ◇ **hysteric aepsia, anorexia nervosa** ◇ **disnaon** g. Bredazoniad a stader etre ar 15t hag an 20t bloavezh, gant ar merc'hed dreist holl, anezhañ leiaat diarvenn an emvoueta, an treutaat, ar mizanliñv.

anorexigène ◇ **anorexiant** ◇ **1 dizilbouedus aa. 2 dizilboueder g. -ioù** 1 O tiren an ilboued. 2 Aoza diounezet evit diren an ilboued, kemeret peurliesañ evit treutaat.

anorexique ◇ **1 1 anilbouedek aa. 1 2 anilbouedeg g. -eion 1 3 anilbouedel aa. 2 1 disnaonek aa. 2 2 disnaoneg g. -eion 2 3 disnaonel** 1 1 Gant an anilboued. 1 2 Gouziviad an anilboued. 1 3 a A-zave d'an anilboued. 2 1 Gant an disnaon. 2 2 Gouziviad an disnaon. 2 3 A-zave d'an disnaon.

anorganique, inorganique ◇ **inorganic** ◇ **ec'hanafel aa., anorganek aa.** A-zivout un anadenn nad eo ket devoudet gant un anaf en organ; sk. : *sourr ec'hanafel ar galon*.

anormal

• *cavité anormale* kavenn anreol • *cheminement anormal de l'excitation* trehentad anreol ar broud, kammforzh ar broud • *conditions anormales* amveziadoù anreol • *écoulement anormal* naouez anreol • *engrènement anormal des dents* kenempradur ezreol an dent, kengovladur ezreol an dent • *glissement anormal du cordon ombilical* difoupadur ezreol ar funig vegetal • *passage anormal*

du glucose dans les urines tremen anreol ar glukoz en troazh • *sensation auditive anormale* eraezadenn glevedel anreol • *situation anormale* plegenn anreol.

anosmie ◇ **anosmia** ◇ **anc'hwesda** g. Koll skiantenn ar c'hwesda.

anosodiaphorie ◇ **anosodiaphoria** ◇ **nammaneroug** g. Digasted ar c'hlañvour ouzh e glañvadur, e tro al ledseizi dreist holl.

anosognosie ◇ **anosognosia** ◇ **nammandenaoud** g. Dic'halloud ar c'hlañvour da gaout reiz eus e glañvadur, hag eñ anat koulskoude, evel ul ledseizi, ul ledangwel, un ankomz enluzañ, un andenaoud gwelout.

anovarie ◇ **anovaria** ◇ **anvirez** g. 1 Ezvezañs pe angwe unan pe an div vierez. 2 Skorted borc'hañ ar vierez.

anovulation ◇ **anovulation** ◇ **andozv** g. Ezvezañs dozviñ ar vigellig.

anovulatoire ◇ **anovulatory** ◇ **1 andozvek** aa. **2 andozveiat** aa. **3 andozveiad** g. -où **4 andozvel** aa. 1 Gant an andozv, na zovz ket. 2 O tevoudañ an andozv. 3 Danvezenn o tevoudañ an andozv. 4 A-zave d'an andozv.

anoxémie ◇ **anoxaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **oksigen**, **anoksemiezh** b. Leiadur ar feur oksigen er gwad.

anoxie ◇ **anoxia** ◇ **gwadisvec'h** g. **oksigen**, **isvec'h oksigen**, **anoksiezh** b. Diouer oksigen en ur gwiad, e dalc'h ur gwadisvec'h pe ur paouez amred; pa vez leiek, e komzer a *oloksigen* pe *hipoksiezh* (sl. *hypoxie*).

anse

• *anse de Henle* kizenn Henle • *anse du cordon ombilical* gwedenn ar funig vegel • *anses intestinales* kilblegoù ar pervez • *anses vasculaires* kilblegoù gwazhied.

antagonisme ◇ **antagonism** ◇ **gourzhal** g., **gourzhalerezh** g. Kenwered daou lia o tisoc'h gant leiadur o gwerc'h (sl. *synergie*).

antagonisme bactérien ◇ **bacterial antagonism** ◇ **gourzhal bakteriel** Skoilh a-berzh ur spesad bakteri ouzh kresk ha neradur ur spesad all.

antagoniste ◇ **antagonist** ◇ **1 1 gourzhaler** aa. **1 2 gourzhalerenn** b. **2 1 gourzhaler** aa. **2 2 gourzhaler** g. -ioù 1 1 A-zivout ur gigenn a zo he gwered oc'h enebañ da geñver ur finvadenn ouzh gwered ur gigenn all, a adanver dre se *galer* (sl. *agoniste*, *synergiste*). 1 2 Kigenn c'hourzhaler, eleze enebet he gwered ouzh hini ur c'*halerenn*. 2 1 A-zivout ul lia enebet e wered ouzh gwered ul lia all. 2 2 Lia gourzhaler.

antalgique ◇ **antalgic**, **analgesic** ◇ **1 dislaur** aa., **dislaurus** aa., **˘dislauriñ**, **eneplaur** aa., **enepgost** aa. **2 1 dic'hostus** aa., **˘dic'hostañ** **2 2 dic'hoster** g. -ioù 1 O talvout da hepkoriñ al laur. 2 1 O lemel pe o tistav al laur. 2 2 Lia dic'hostus (sl. *analésique*).

antalgique

• *à visée antalgique* war-benn dislauriñ • *attitude antalgique* emstumm dislaur, emstumm dislauriñ • *procédé thérapeutique à visée antalgique* araezad yac'hadel gant an amboaz enepgost-.

antécédents ◇ **antecedents**, **previous history** ◇ **diagentoù** l. (g.), **kentanaezioù** l. (g.), **kenthanezadur** g. Stlennadoù a-zivout yec'hed ar gouziviad a-raok ar c'hlañvadur a stader (*diagentoù personel*) hag a-zivout kleñvedoù e familh (*diagentoù familhel*) (sl. *anamnèse*).

antéflexion de l'utérus ◇ **anteflexion of the uterus** ◇ **rakplegad** g. **ar grozh** Stouadur reñverek war raok eus korf ar grozh endra chom reol ahel ar gouzoug.

antéhypophyse, **préhypophyse**, **lobe antérieur de l'hypophyse**, **lobe glandulaire de l'hypophyse** ◇ **adenohypophysis** ◇ **rakgougorfenn** b. Parzh araok ar c'hougorfenn, sez borc'hadur an tireostimulin, ar gonadostimulin, ar c'horticotrofin, ar prolaktin hag ar somathormon.

antéposition de l'utérus ◇ **anteponition of the uterus** ◇ **rakloadur** g. **ar grozh** Dilec'hiadur war raok ar grozh hep kemm e durc'hadur ar c'horf hag ar gouzoug.

anté pulsion ◇ **antepulsion** ◇ **1 rakkorzhañ** **2 rak-korzhad** g. 1 Kas war raok un ezel pe ur rann ezel. 2 Emstumm o tisoc'h eus ar rakkorzhañ.

antérograde

• *amnésie antérograde* ankoun dianasat.

antétraction ◇ **stooping attitude** ◇ **1 rakstouiñ** **2 rakstouad** g. 1 Plegañ ar c'horf war raok dre an argrezañ andiarvenn eus kigennoù ar c'horf stadet e kleñved Parkinson. 2 Emstumm o tisoc'h eus ar rakstouiñ.

antéversion de l'utérus ◇ **anteversion of the uterus** ◇ **rak'hwelad** g. **ar grozh** Stouadur war raok eus ar grozh en he fezh, ar c'horf o vont a-zremm hag ar gouzoug, kaset war drefiv ha war grec'h, o vont harp ouzh ar youlc'h.

antéversion du col du fémur ◇ ◇ **rak'hwelad gouzoug an askorn morzhed** Beskelledd reñverek war raok eus gouzoug an askorn morzhed e-keñver ahel ar skodennoù, ar veskelledd reol o vezañ gavaelet etre 15° ha 20°.

anthelminthique ◇ **anthelminthic** ◇ **1 enepkest** aa. **2 enepkesteg** g. -eier 1 Gwezhus ouzh ar preñved arvevat. 2 Gwezher diounezet ouzh ar preñved arvevat.

anthracose ◇ **anthracosis** ◇ **antrakoz** g. Analeuflegezh diwar zewentadur rannigoù glaou.

- anthracosilicose** ◇ **anthracosilicosis** ◇ **antrakosilikoz** g. Analeuflegezh diwar zewentadur kevret rannigoù glaou ha silika (sl. *pneumoconiose*).
- anthrax** ◇ **carbuncle** ◇ **gourhesked** g. Anaf poreel eus ar benvegad gwagrennel blev-soav diwar strepokok, o c'hoarvezout eus ur gronnad a lies hesked.
- anthropogammamétrie** ◇ **whole body counting** ◇ **korfgammaventerezh** g. Muzul skinoberiegezh gamma a c'hell e degouezhioù 'zo bezañ ec'hodet gant korf un den.
- anthropométrie** ◇ **anthropometry** ◇ **korfvuzulierezh** g. 1 Rann an Denoniezh o plediñ gant mentoù parzhioù korf an den. 2 Hentenn hennaderezh an denion diazezet war vuzulierezh parzhioù o c'horf.
- anthropophile** ◇ **anthropophilous** ◇ **dengerc'h** aa., **dengerc'hek** aa. A-zivout an amprevaned o flemmañ an dud hepken (*dengerc'h strizh*) pe an dud dreist holl (*dengerc'h amstrizh*).
- anthropophilie** ◇ **anthropophilia** ◇ **dengerc'h** g., **dengerc'hegezh** b. Tuadur amprevaned 'zo (moustiked) da flemmañ an dud.
- anti-acide** ◇ **antacid** ◇ **eneprenkeg** g. -eier Lia diounezet dre ar genoù war-benn leiaat trenkegezh ar stomok.
- anti-adrénergique** ◇ **adrenergic neuron blocking agent** ◇ **1 adrenharzer** aa. **2 adrenharzer** g. -ioù 1 O tireizhañ gwikefreoù kadav ha dilaosk ar c'hatekolaminoù (adrenalin, noradrenalin). 2 Lia adrenharzer, diounezet da leiaat ar gwask talmerel (sl. *adrénolytique, ganglioplégique, sympathicolitique*).
- anti-agrégant, anti-agrégant** ◇ **antisludge** ◇ **1 enepdazus** aa., **enepdazer** aa. **2 enepdazer** g. -ioù 1 O skoilhañ ouzh tolpadur ar c'helligoù ruz pe ouzh dazadur ar pladanou ebarzh ar gwazhied. 2 Lia enepdazus.
- anti-allergique** ◇ **antiallergic** ◇ **1 eneballergek** aa. **2 eneballergeg** g. -eier 1 Gwezhus ouzh erzerc'hadoù hollek ha lec'hiek an allergiezh. 2 Lia eneballergek.
- anti-amaril** ◇ **antiamarilic** ◇ **1 enebamaril** aa. **2 enebamarileg** g. -eier 1 Gwezhus ouzh an derzhienn velen. 2 Lia enebamaril.
- anti-angineux, anti-angoreux** ◇ **antianginal** ◇ **1 enepkevenkez** aa. **2 enepkevenkezeg** g. -eier 1 Gwezhus ouzh ar c'hevenkez. 2 Lia enepkevenkez.
- anti-anticorps** ◇ **antiantibody** ◇ **antiantikorf** g. Antikorf spesadel danzeet gant ur bevedeg allspesad ouzh ur protein a zo un antikorf e unan.
- anti-arythmique** ◇ **antiarrhythmic** ◇ **1 enepmigorvez** aa. **2 enepmigorvezeg** g. -eier 1 Gwezhus ouzh straufuilhoù korvez ar galon. 2 Lia enepmigorvez; al liaoù enepmigorvez zo dezho da berzhioù leiaat usvroudadusted, emgefteegezh ha reüsted ar c'haher kalon ha dre se lemel an dreistsistolioù, an ustalm, ar gwienneghad.
- anti-asthmatique** ◇ **antiasthmatic** ◇ **1 enebastma** aa. **2 enebastmateg** g. -eier 1 Gwezhus ouzh an astma. 2 Lia enebastma.
- anti-athérogène** ◇ **antiatherogen** ◇ **1 enebateromeiat** aa. **2 enebateromeiat** g. -où 1 Gwezhus ouzh furmidigezh an aterom. 2 Lia enebateromeiat.
- anti-émétique, antiémétisant** ◇ **antiemetic** ◇ **1 enepc'hwelus** aa. **2 enepc'hweluzenn** b. -où 1 Gwezhus ouzh an doñjer hag ar c'hweliñ. 2 Lia enepc'hwelus.
- anti-épileptique, anticomitial, anticonvulsivant** ◇ **antiepileptic, anticonvulsivant** ◇ **1 enepdroukfell** aa., **enepkrid** aa. **2 enepdroukfelleg** g. -eier, **enepkrideg** g. -eier 1 Gwezhus ouzh an droukfell. 2 Lia enepdroukfell.
- anti-inflammatoire** ◇ **antiinflammatory** ◇ **1 enepfo** aa. **2 enepfoeg** g. -eier 1 Gwezhus ouzh an danijenn. 2 Lia enepfo.
- anti-œstrogène** ◇ **antioestrogen** ◇ **estrogendolc'her** aa. O skoilhañ gwered an estrogenoù (sl. *antimitotique*).
- anti-oncogènes** ◇ **antioncogens** ◇ **antionkogen** s. Gen astaler ar c'hankr; enebiñ a reont ouzh an onkogen, gen ar c'hankr.
- anti-ourlien** ◇ **enepjotorell** aa. Oc'h enebiñ ouzh ar jotorell, sk. : *vaksin enepjotorell*.
- anti-oxydant, anti-oxygène** ◇ **antioxydant** ◇ **1 eneboksider** aa. **2 eneboksider** g. -ioù 1 Oc'h enebiñ ouzh an oksidañ. 2 Lia eneboksider, o skoilhañ gwered bonadoù digraf 'zo.
- anti-Xa** ◇ **anti Xa** ◇ **1 enepXa** aa. **2 enepXa** g. -où 1 Oc'h enebiñ ouzh ar barenn gaoulediñ Xa, eleze o piaouañ parzhioù enepromboz. 2 Danvezenn enepXa, sk. : an heparinoù a dolz mol izel.
- antibactérien** ◇ **antibacterial** ◇ **1 enepbakteri** aa. **enepbakterieg** g. -eier 1 Noazus ouzh ar bakteri. 2 Danvezenn enepbakteri.
- antibiogramme** ◇ **antibiogram** ◇ **bevastalbrouad** g. Araezad da arnodiñ *in vitro* gwered ar bevastaleroù ouzh ur skod bakteri.
- antibioprophylaxie** ◇ **antibioprophylaxis** ◇ **bevastalergurañ** Arver ar bevastaleroù en amboaz dizarbenn darvezadur ur pore da geñver un oberatadenn pe un anaev viruzel.
- antibiorésistance** ◇ **antibiotic resistance** ◇ **bevastalharzusted** b. Perzh ar bakteri da badout ouzh ar bevastaleroù.
- antibiothérapie** ◇ **bevastalergurañ** Mezegañ dre ar bevastaleroù.

antibiotique ◇ **antibiotic** ◇ **1 bevastaler aa. 2 bevastaler g. -ioù** 1 En araez da skoilhañ neridigezh bakteri 'zo ha d'o dispenn. 2 Lia bevastaler; da gentañ ne veze anvet bevastalerioù nemet danvezennoù bevenaozet gant foue 'zo; hiziv ez astenner an anvad da gediadoù damgevanaoz ha kevanaoz heñvel o gweredoù enepbakteri (sl. *antibactérien, antifongique, antiseptique, bactéricide, bactériostatique*).

antibiotique

• *antibiotiques antistaphylococciques* bevastalerioù enepstafilokok, enepstafilokokeier • *antibiotiques antituberculeux* bevastalerioù eneporzhelllek, eneporzhellleier • *antibiotiques macrolides* bevastalerioù makrolidek, makrolideier • *antibiotiques polypeptidiques* bevastalerioù polipeptidek • *antibiotiques semi-synthétiques* bevastalerioù damgevanaoz • *antibiotiques synthétiques* bevastalerioù kevanaoz.

anticancer, antinéoplasique ◇ **anticancer** ◇ **1 enepkankr aa., enephanwe aa. 2 enepkankreg g. -eier, enephanweeg g. -eier** 1 Oc'h enebñ ouzh ar c'hankr. 2 Lia enepkankr; anvadoù rumm an danvezennoù arveret da zistrujañ ar c'helligoù kankrel pe da virout outo a neriñ (sl. *antimitotique*).

anticancérogénétique, anticancérogénique ◇ **anticancero-genic** ◇ **1 enepkankreiat aa. 2 enepkankreiad g. -où** 1 Oc'h enebñ ouzh diwan ur c'hankr. 2 Gwezher enepkankreiat.

anticathode ◇ **anticathode** ◇ **gourzhkatod g.** Bukenn vetal ponner (tungsten) lakaet a-dreuz treug un hordenn elektron ec'hodet gant katod ur ganer skinoù X.

anticétogène ◇ **antiketogenic** ◇ **1 enepketoneiat aa. 2 enepketoneiad g. -où** 1 O parraat ouzh dec'h an ar c'horfoù ketonek ha dre se o tizarbenn an akidoz. 2 Gwezher enepketoneiat.

anticholinergique ◇ **anticholinergic** ◇ **1 kolindolc'her aa. 2 kolindolc'her g. -eier** 1 O skoilhañ gwered an aketilkolin e par gwiennoù goudekangrenn ar reizhiad parasimpatek (sl. *vagolytique*). 2 Gwezher kolindolc'her.

anticoagulant ◇ **anticoagulant** ◇ **1 ~ enepkaouledañ, enepkaouledus aa. 2 enepkaouleder g. -ioù** 1 O parraat ouzh ar c'haouledañ. 2 Danvezenn o skoilhañ un pe lies parenn eus ar c'haouledañ.

anticoagulant circulant ◇ **circulating anticoagulant** ◇ **enepkaouleder amredat** Danvezenn eus ar plasma dezhi perzhioù enepkaouledus.

anticodon ◇ **anticodon** ◇ **antikodon g.** Elfenn eus an hilvoneg anezhi un triad nukleotid eus an drenkenn ribonukleek treuzkas (tRNA) klokaus d'un triad eus an drenkenn ribonukleek kannad (mRNA).

anticomplémentaire ◇ **anticomplementary** ◇ **klokaenn-harzer aa.** O skoilhañ gwered ar glokaenn; a-zivout ur gwadvezioù lenañ ar glokaenn en ezvezañs ar c'hizidikaer hag o herzel enta ouzh dazgwered al lenañ, eleze o lemel an araez da zinoñ bezañs an antikorf.

anticorps ◇ **antibody** ◇ **antikorf g. -où** Globulin eus ar plasma dezhañ ar perzh kediañ ent spesadel ouzh danvezennoù estren dileizhet er gwadvezioù pe bezant er c'helligoù a anver antigenoù; enaozet e vez an antikorfoù gant ar plasmokit hag al leukokit B da heul keraez ar bevedeg gant antigenoù; naouaat a reont ar re-mañ hag o ezniñvañ dre o dazgludañ (*aglutininoù*), dre o dispenn pe o dileizhañ pa vez anezho elfennoù luniek (*hemolizinoù, kitotoksinoù*), dre o neptuiñ pa vez anezho viruzoù (*antikorfoù neptuiñ*) pe toksinoù (*antitoksinoù*) pe dre o gouledañ pa vez anezho albuminveier (*prekipitinoù*); hervez orin an antigen raklen e lakaer kemm etre an *antikorfoù allspesadien* (*allspesadantikorfoù*), an *antikorfoù unspesadien* (*unspesadantikorfoù*), an *unanantikorfoù* (a vez an antigen parzhiat er bevedeg end-eeun), an *antikorfoù bonan* (bezant er gwadvezioù kuit a antigen raklen).

anticorps bivalent ◇ **bivalent antibody** ◇ **antikorf daoulenus** Antikorf a c'hell e volekul lenañ ouzh e c'horre daou volekul eus an antigen keñverek; un antikorf klok eo (sl. *anticorps complet*).

anticorps complet ◇ **complete antibody** ◇ **antikorf klok** Antikorf o tazgludañ an hemati e-barzh un dileizhenn holen da 7%.

anticorps hétérophile ◇ **heterophile antibody** ◇ **antikorf etrerummadel** Antikorf o tazgweredañ ouzh an un antigen, forzh pehini e ve rummad (genad, spesad) ar bevedeg keraezet (sl. *antigène hétérophile*).

anticorps incomplet ◇ **incomplete antibody** ◇ **antikorf diglok** Antikorf o lenañ ouzh gorre e antigen (hemati, bakteri), ouzh e gizidikaat hep mui; kalvezadoù a ranker arverañ evit disoc'h gant an dazgludañ.

anticorps monoclonaux ◇ **monoclonal antibodies** ◇ **antikorfoù unskodien** Antikorfoù o tont eus an un skod limfokit (plasmokit) hag o piaouañ ent strizh an un naousterioù, peurgetket an un hangediusted ouzh an un antigen (sl. *immunodépresseur*).

anticorps monovalent ◇ **univalent antibody** ◇ **antikorf unlenus** Antikorf ne c'hell e volekul lenañ ouzh e c'horre nemet ur molekul eus an antigen keñverek; un antikorf diglok eo (sl. *anticorps incomplet*).

anticorps : site ~ ◇ **antibody site** ◇ **hanload g. antikorf** Rann eus molekul an antikorf en araez da naouaat an antigen.

anticorps

• *anticorps antileucocytaire* antikorf antileukokit • *anticorps antitissus* antikorf antigwiad • *anticorps bloquant* antikorf tolc'hus • *anticorps chaud* antikorf tomm • *anticorps circulant* antikorf amredat • *anticorps facilitant* antikorf herouezus • *anticorps froid* antikorf yen • *anticorps immun* hangaentikorf • *anticorps immunitaire* antikorf hangaeel • *anticorps naturel* antikorf genidik • *auto-anticorps* unanantikorf • *hétéro-anticorps* antikorf allspesadien, allspesadantikorf • *iso-anticorps* antikorf unspesadien, unspesadantikorf.

antidépresseur, thymo-analeptique ◇ **antidepressant** ◇ **1 enepgouvid** aa., **noausreer** aa. **2 enepgouvid** g. -eier, **noausreer** g. -ioù 1 Oc'h enebñ ouzh ar gouvid. 2 Lia diounezet ouzh ar gouvid (sl. *psychotropes*).

antidépresseurs imipraminiques ◇ ◇ **enepgouvideier imipraminek** Rumm gwezherioù enepgouvid a zo tri c'horvell oc'h amparañ luniad o molekul, an imipramin o vezañ ar penn stell anezho.

antidérapant

- *denture antidérapante* dent disrampus.

antidiabétique ◇ **antidiabetic** ◇ **1 enepdiabet** aa. **2 enepdiabeteg** g. -eier 1 Oc'h isvec'hiañ glukoz ar gwad. 2 Lia enepdiabet; an insulin naturel e voe an enepdiabeteg kentañ; hiziv, ouzhpenn an insulin, diounezet dre sankañ, ez arverer liaoù glukozisvec'hiañ genaouel.

antidiarrhéique ◇ **antidiarrhoeal** ◇ **1 enepdarc'hoal** aa. **2 enepdarc'hoaleg** aa. -eier 1 O terriñ d'an darc'hoal. 2 Lia enepdarc'hoal.

antidiphthérique ◇ **antidiphtheric** ◇ **enepdifterek** aa. Oc'h enebñ ouzh an difteriez, sk. : *vaksin enepdifterek*.

antidiurétique : hormone ~, **vasopressine, ADH, pitressine** ◇ **vasopressin, antidiuretic hormone, ADH** ◇ **hormon g. eneptroasheiat, vazopresin g., ADH** Hormon borc'het gant ar gouzerc'hvel, e wered uhelaat ar gwask talmerel ha muiañ dassugañ an dour gant an duellenn lounezh.

antidopaminergique ◇ **antidopaminergic** ◇ **dopamindolc'her** aa. Oc'h enebñ ouzh gwered an dopamin.

antidote ◇ **antidote** ◇ **digontamm** g. Danvezenn en araez da ezniñvañ ur c'hontamm pe da skoilhañ e wered er bevedeg dre ur wikefre fizikel, kimiek, bevgimiek pe liaoniel.

andidromique ◇ **antidromic** ◇ **ginre** aa. A-zivout an nervren o vont war an tu gin en un nervwienn.

antidromique : conduction ~ ◇ **antidromic conduction** ◇ **ginren** aa. Nervren o vont war un tu gin.

antifibrillant ◇ **antifibrillatory** ◇ **1 enepkrehad** aa. **2 enepkrehadeg** aa. -eier 1 Gwezhus ouzh ar gwiennkrehad. 2 Lia enepkrehad.

antifibrinolytique ◇ **antifibrinolytic** ◇ **1 fibrindisloezus** aa., **fibrindisloezer** aa. **2 fibrindisloezer** g. -ioù 1 O parraat ouzh ar fibrinloezañ hag o tizarbenn ar gwadliñvoù diwar rewered ar plasmin. 2 Lia fibrindisloezer (sl. *antiplasmine*).

antifolique ◇ **antifolate** ◇ **1 enepfolek** aa. **2 enepfoleg** g. -eier 1 Oc'h enebñ ouzh gwered an drenkenn folek. 2 Gourzhaler an drenkenn folek, erskrivet ouzh ar c'hankroù, al leukemiezh, ar baludegezh.

antifongique, antifungique, antimycotique ◇ **antifungal** ◇ **1 foueastaler** aa. **2 foueastaler** g. -ioù 1 Oc'h enebñ ouzh ar foue. 2 Danvezenn o tistrujañ ar foue hag ar goelloù kiriek d'ar mikoziou (*fungicide, fouelazher*) pe o virout outo a greskiñ hag a neriñ (*fungistatique, foueharzer*).

antigène ◇ **antigen** ◇ **antigen** g. -où Nep danvezenn, pa geraez ur bevedeg, en laka da furmiñ un antikorf a gedio outi ent hanbarek; un antigen a c'hell dec'han un erwezh a zreistkizidigezh pe un erwezh a gempadusted hangaeel; an antigenoù a c'hoarvez a gorfoù luniek bev pe varv pe eus an dedaoladoù anezho (borc'hadoù, toksinoù).

antigène de surface ◇ **surface antigen** ◇ **antigen gorre** Antigen lenet ouzh kennenn ar c'helligoù.

antigène érythrocytaire ◇ **blood-group antigen** ◇ **antigen gwadrizhel** Antigen bezant er c'helligoù ruz ha gwenn hag e gwiadoù diseurt eus ar bevedeg; diwar ar 130 antigen gwadrizhel a anavez, daou hepken zo a bouez : an antigenoù A ha B a zo o bezañs pe o ezvezañs naous d'ar rizhoù gwad ha devoudus d'ar c'hempadustedoù gwad ha gwiad.

antigène hétérophile ◇ **heterophile antigen** ◇ **antigen etrerummadel** Antigen bezant er bevedegoù a rummadoù (genadoù, spesadoù) kevarall hag o lakaat an un antikorf da zivanañ bepred, forzh pehini e ve e orin (sl. *anticorps hétérophile*).

antigène privé ◇ **private antigen** ◇ **antigen prevez** Antigen dibaot, bezant war gelligoù un niver bihan a himiennoù.

antigène prostatique spécifique, APS, PSA ◇ **prostate-specific antigen, PSA** ◇ **antigen spesadel ar raksavenn, ASR** Glikoprotein borc'het gant epitelienn ar raksavenn a vez an usvec'h gwad anezhañ azonus da anaeziou ar raksavenn, d'ar c'hankr pergen.

antigène public ◇ **public antigen** ◇ **antigen foran** Antigen bezant war gelligoù an darn vuiañ eus ar bevedegoù.

antigène tissulaire, antigène d'histocompatibilité, antigène de greffe, antigène de transplantation ◇ **tissue antigen** ◇ **antigen gwiad, antigen gwiadkempadusted** Antigen bezant war holl gelligoù ar bevedeg; emañ an antigenoù gwiad e devoud darbenn pe distaol an imboudoù.

antigène tumoral ◇ **tumour antigen** ◇ **antigen hanweel** Antigen bezant er gwiadoù kankrek.

antigénémie ◇ **antigenaemia** ◇ **gwadvec'h g. antigen, antigenwadvec'h g.** Bezañs ha feur un antigen er gwad.

antigénicité, antigénie, potentiel antigénique ◇ **antigenicity** ◇ **antigenusted** b. Barregezh un danvezenn da werediñ evel antigen, eleze da lakaat antikorfoù da zivanañ er bevedegoù keraezet.

antigénique ◇ **antigenic** ◇ **1 antigenek** aa. **2 antigenus** aa. **3 antigenel** aa. 1 Gantañ perzhioù antigen. 2 A zo danvez antigen. 3 A-zave d'an antigenoù.

antigénique : **site** ~, **déterminant** ~, **épitope** ◇ **antigenic determinant** ◇ **hanload** g. **antigen** Luniad loet e gorre ur molekul antigen, en araez da gediañ ent spesadel gant ur rann eus an antikorff keñverek (hanload antikorff); dre vras war un antigen e vez lies hanload, en araez da gediañ gant pep a antikorff spesadel.

antigène, antigénique

• *constitution antigénique* genezh antigenel • *liquide antigénique* liñvenn antigenek • *propriétés antigéniques et immunisantes* antigenusted ha hangaeüsted • *protéines antigéniques* proteinou antigenek • *antigène Australia*, *antigène Australia* antigen Aost-ralia • *antigène HLA* antigen HLA • *antigène leucocytaire* antigen leukokitel • *antigène plaquettaire* antigen pladanel.

antiglobuline ◇ **antiglobulin** ◇ **antiglobulin** g. Globulin eus ar gwadvez o werediñ evel un antikorff ouzh globulinoù all a zo warno hanloadoù antigen.

antigoutteux ◇ ◇ **1 eneburloù** aa. **2 eneburlaoueg** g. -eier 1 Gwezhus ouzh an urloù. 2 Gwezher diounezet ouzh an urloù (kolkikin, enepfoeier ansteroidel, uregisvec'herioù).

antigrippal ◇ ◇ **enepegrip** aa. Oc'h enebiñ ouzh ar grip, sk. : *vaksin enepgrip*.

antihistaminique ◇ **antihistaminic** ◇ **histamindolc'her** aa. **2 histamindolc'her** g. -ioù 1 Oc'h enebiñ ouzh gwered an histamin. 2 Lia histamindolc'her; gweredoù an histamindolc'herioù zo dizargrezañ ar gwiennoù levn, frankaat ar gwazhied, leiaat hedreuzded ar c'horrwazhied, astaliñ an debron; ne weredont ket avat ouzh an usvorc'h er c'hreuz.

antihormone ◇ **antihormone** ◇ **1 hormondolc'her** g. **2 antihormon** g. 1 Danvezenn oc'h enebiñ ouzh un hormon dre werediñ war an organ, ar gwiaed pe ar gellig kizidik outañ. 2 Antikorff furmet ouzh un hormon allspesadien pe, a-wechoù, ouzh un hormon unspesadien.

antihypertenseur ◇ **antihypertensive** ◇ **1 enebuswask** aa. **2 enebuswaskeg** g. -eier 1 O tiren an uswask talmerel. 2 Lia enebuswask.

antilépreux ◇ **antileprotic** ◇ **1 eneplovrezh** aa. **2 eneplovrezheg** g. -eier 1 Gwezhus ouzh al lovrezh. 2 Lia eneplovrezh.

antileucémique ◇ **antileucaemic** ◇ **1 enepleukemek** aa. **2 enepleukemeg** g. -eier 1 Oc'h enebiñ ouzh al leukemiezh. 2 Lia enepleukemek.

antilymphocyte, antilymphocytaire : **sérum** ~, **SAL** ◇ **antilymphocytic serum, ALS** ◇ **gwadvez** g. **antilimfokit** Gwadvez allspesadien oc'h ezniñvañ al limfokit : *in vitro* en o dazglud hag en o dispenn; *in vivo* e leia o niver hag o hangaeüsted; prientet e vez dre lakaat antikorfoù da ziwanañ e-barzh gwadvez loened bet kerazet gant limfokit denel; danvezet e vez ar gwadvez antilimfokit evel hangaevlinaer.

antimétabolite ◇ **antimetabolite** ◇ **gourzhkennevidad** g. Danvezenn (sulfamid, enepfoleg) nes he luniadezh da hini ur c'hennevidad, ouzh e amsvañ hag o strafuilhañ gwidennad ar c'hennevid.

antimitogaineux ◇ **antimitogaine** ◇ **1 enepkernad** aa. **2 enepkernadeg** g. -eier 1 Gwezhus ouzh ar gernad. 2 Lia enepkernad.

antimitotique ◇ **antimitotic** ◇ **1 mitozastaler** aa. **2 mitozastaler** g. -ioù 1 O skoilhañ ar mitoz, eleze o virout ouzh ar c'helligoù a emrannañ hag a neriñ. 2 Lia o skoilhañ ar mitoz, arveret er c'himigurañ enepkankr (sl. *anticancéreux*).

antinaupathique ◇ ◇ **1 enepteadell** aa. **2 enepteadelleg** g. -eier 1 Oc'h enebiñ ouzh an deadell (droug an dezougen : droug mor, droug karr, droug nij, h.a.). 2 Lia enepteadell.

antinidatoire ◇ ◇ **dizenneizhius** aa. O virout ouzh ar vi speriet a enneizhiañ.

antipaludéen, antipaludique, antimalarique ◇ **antimalarial** ◇ **1 eneppaludek** aa. **2 eneppaludeg** g. -eier 1 Gwezhus ouzh ar baludegezh. 2 Lia eneppaludek.

antiparasitaire ◇ **antiparasitic** ◇ **1 enebarvevad** aa. **2 enebarvevadeg** g. -eier 1 Oc'h enebiñ ouzh an arvevad. 2 Lia enebarvevad, sk. : an *enepkesteier*; an *eneppaludeier*.

antiparkinsonien ◇ **antiparkinsonian** ◇ **1 enepparkinson** aa. **2 enepparkinsoneg** g. -eier 1 O tiren kren ha reuted kleñved Parkinson hag an azoniadoù parkinsonvanek. 2 Lia enepparkinson.

antipellagreuse; **vitamine** ~, **vitamine PP, niacine** ◇ **antipellagra vitamin** ◇ **vitamin** g. **enepellagr, vitamin PP, niakin** g. Danvezenn o c'hoarvezout a drenken nikitineg hag a nikitinamid, bezant en edeier, en avu hag er c'higennoù; an negez anezhañ a zevoud ar pellagr, tizhadoù koazhadel (teodof, aftoù), anafoù kroc'hen ha strafuilhoù bred.

antipéristaltique ◇ **antiperistaltic** ◇ **ginamdonnek** aa. A-zivout an argrezadoù o loc'hañ a-c'hin d'an amdonnegezh reol.

antiplaquettaire ◇ **antiplatelet** ◇ **1 pladanharzer** aa. **2 pladanharzer** g. -ioù 1 O skoilhañ gwered ar pladanoù dre herzel ouzh an dazadur anezho e-barzh ar gwazhied. 2 Danvezenn pladanharzer, sk. : an *aspirin*, an *tiklopidin*.

antiplasmine, antifibrinolysine ◇ **antiplasmin** ◇ **plasmindolc'her** g. -ioù Enzim ar gwad o skoilhañ gwered ar plasmin (pe fibrinolizin), eleze ouzh dileizhadur ar gaouledenn.

antiprogestatif ◇ **antiprogesterone compound** ◇ **1 bec'hastaler** aa. **bec'hastaler** g. -ioù 1 O skoilhañ ouzh ar vec'hiegi. 2 D anvezenn o skoilhañ ouzh ar vec'hiegi.

antiprogéstérone ◇ **antiprogesterone** ◇ **1 progesteron-dolc'her** aa. **2 progesterondolc'her** g. -ioù 1 O skoilhañ ouzh gwered ar progesteron. 2 Danvezenn progesterondolc'her, hormondolc'her arveret evel bec'hastaler goudekediañ hag evel sioc'haner.

antiprolactinique ◇ ◇ **prolaktindolc'her** aa. O skoilhañ gwered ar prolaktin.

antiprurigineux ◇ **antipruritic** ◇ **1 enepdebron** aa. **2 enepdebroneg** g. **-eier** 1 Gwezhus ouzh an debron. 2 Danvezenn ganti ur gwered azoniek ouzh an debron, diounezet dre an hent hollek pe dre arloadurioù lec'hiek.

antipsychiatrie ◇ **antipsychiatry** ◇ **gourzhbredvezekniezh** b. Luskad oc'h arzaelañ ar vredvezekniezh klasel, oc'h arlakaat ar parennoù diavaez, daraezioù ar gedvuhez pergen, e devoud ar c'hleñvedoù bred.

antipsychotique ◇ **antipsychotic** ◇ **1 enepssikoz** aa. **2 enepssikozeg** g. **-eier** 1 Oc'h enebiñ ouzh an anaezioù psikozele. 2 Lia enepssikoz.

antipurique, antipurine ◇ **purine antagonist** ◇ **eneppureg** g. **-eier** 1 O skoilhañ enaoz ar bazennoù purek. 2 Gwezher eneppurek eus rumm ar gourzhkennevidadoù diounezet evel enephanweeg.

antipyrétique ◇ **antipyretic** ◇ **1 enepterzhienn** aa. **2 enepterzhienneg** g. **-eier** 1 Gwezhus ouzh an derzhienn. 2 Lia enepterzhienn.

antipirimidine ◇ **pyrimidic antagonist** ◇ **eneppirimiteiad** g. **-où** Danvezenn o skoilhañ ouzh enaoz ar bazennoù pirimidek; an eneppirimiteiadoù zo gourzhkennevidadoù arveret evel mitozastalerioù.

antirabique ◇ **antirabic** ◇ **enepkonnar** aa. Oc'h enebiñ ouzh ar gonnar, sk. : *vaksin enepkonnar*.

antirachitique ◇ **antirachitic** ◇ **eneplec'h** aa. En araez da ergurañ pe da gurañ al lec'h, sk. : *vitamin D₂ eneplec'h*.

antiradicalaire ◇ ◇ **bonadrezharzer** aa. O skoilhañ gwered ar bonadoù rez (pe bonadoù digraf).

antirénine ◇ **antirenin** ◇ **antirenin** g. **-où** Antikorf o tiwanañ gant ul loen da heul ensinkladoù renin o tont eus ul loen allspesad.

antirétroviral ◇ **antiretroviral** ◇ **1 enepretroviruz** aa. **2 enepretroviruzeg** g. **-eier** 1 Oc'h enebiñ ouzh ar retroviruzoù. 2 Lia enepretroviruz.

antirougeoleux, antimorbilleux ◇ ◇ **enepruzell** aa. Oc'h enebiñ ouzh ar ruzell, sk. : *vaksin enepruzell*.

antirubéoleux ◇ ◇ **enepruzig** aa. Oc'h enebiñ ouzh ar ruzig, sk. : *vaksin enepruzig*.

antiscabieux, antisorique ◇ **acaricide** ◇ **1 enephakrez** aa. **enephakrezeg** g. **-eier** 1 Oc'h enebiñ ouzh an hakrez. 2 Lia enephakrez.

antiséborrhéique

- *vitamine antiséborrhéique* vitamin enepsoavred.

antisens, oligonucléotide antisens ◇ **antisense** ◇ **stlennharzer** g. **-ioù** Oligonukleotid klokaenn d'un mRNA o skurziñ gwered hemañ ha dre se o skoilhañ ouzh enaoz ar proteinoù.

antiseptie ◇ **antiseptis** ◇ **dilesterezh** g. Hentenn stourm ouzh an hadennoù lestek, anezhi dispenn ar bakteri kleñvedus el lec'h m'emañ ha dre se dizarbenn an anaezioù lestel ha poreel.

antiseptique ◇ **antiseptic** ◇ **1 dilestus** aa., **dilester** aa. **2 dilester** g. **-ioù** Danvezenn gimiek bakteriharz pe vakterilazh, arloadus ouzh ar gwiadoù bev; dre astenn e reer dilesterioù eus gwezhurioù diounezadus dre ar genoù evit prederiañ poreadoù pervezel ha troazhel (sl. *antibactérien, antifongique, bactéricide, bactériostatique*).

antiseptique acide ◇ **acid antiseptic** ◇ **dilester trenkek** Dilester a zo e berzhioù garvevlazh e dalc'h an dilaosk eus ion hidrogen.

antiseptique halogéné ◇ **halogen-containing antiseptic** ◇ **dilester halogenek** Dilester a zo ennañ un halogen, iod pe klor.

antiseptique intestinal ◇ **intestinal antiseptic** ◇ **dilester pervez** Danvezenn dilestus diounezet dre euvriñ, ansuget gant ar benvegad koazhañ, gwezhus ouzh un niver hadennoù kleñvedus er pervez.

antiseptique oxydant ◇ **oxidizing antiseptic** ◇ **dilester oksidañ** Dilester o werediñ dre un argerzh oksidañ.

antiseptique phénolique ◇ **antiseptic phenol derivatives** ◇ **dilester fenolek** Dilester deveret diouzh ar fenol, gantañ ur galloud bakteriharz brasoc'h hag ur bistrusted vihanoc'h eget gant ar fenol.

antiseptique tensio-actif ◇ **surface active antiseptic** ◇ **dilester gorwezhus** Dilester o werediñ dre zaskemmañ kennenoù ar bakteri.

antiseptique urinaire ◇ **urinary antiseptic** ◇ **dilester troazhel** Dilester euvret dre ar genoù hag ezvevnet dre an troazh diouzh bec'hioù gweredus.

antiseptiques : métaux lourds ~ ◇ **metal containing antiseptics** ◇ **dilesterioù metalek** Rumm kediadoù dilestus enno ur metal ponner : argant, kouevr, bevargant, zink.

antiseptiser ◇ **to antisepticise** ◇ **dilestañ** Embreger an dilesterezh, eleze distrujañ ar garvevion war ar gwiadoù bev.

antiseptique

- *des antiseptiques* gwezhurioù dilestus, dilesterioù • *propriétés antiseptiques* perzhioù dilestañ.

antisérum ◇ **antiserum** ◇ **gwadvez** g. **antikorfek, antigwadvez** g. Gwadvez ul loen bet keraezet gant un antigen all-pe unspesaden ha danzeet gantañ antikorfou gwezhus ouzh an kez antigen.

antisommeilleux ◇ **antitrypanosomal** ◇ **enepmorvitell** aa., **eneptrianozom** aa. Gwezhus ouzh ar vorvitell.

- antispasmodique, antispastique, spasmolytique** ◇ **antispastic, antispasmodic** ◇ **1 enebandag aa. 2 enebandageg g. -eier** Gwezhus ouzh an andagoù (glazoù, dargrezadoù). 2 Lia enebandag.
- antistreptokinase, ask** ◇ **antistreptokinase** ◇ **antistreptokinaz g., ASK** Antikorf oc'h ezniñvañ ar streptokinaz, antigen borc'het gant ar strepokok.
- antistreptolysine O, ASL O** ◇ **antistreptolysin O** ◇ **antistreptolizin O g., ASL O** Antikorf oc'h ezniñvañ ar streptolizin O, antigen borc'het gant ar strepokok gwadloezus A, C pe G; dinoet er gwadveiz e-kerz ar poreoù diwar strepokok hemolitek hag e-kerz remm lemm an arzoù.
- antisudoral** ◇ **antisudoral** ◇ **1 enebusc'hwez aa. 2 enebusc'hwezeg g. -eier** 1 Oc'h enebiñ ouzh an usc'hwez. 2 Lia enebusc'hwez.
- antisiphilitique** ◇ **antisiphilitic** ◇ **1 enepsifiliz aa. 2 enepsifilizeg aa. -eier** 1 Gwezhus ouzh ar sifiliz. 2 Lia enepsifiliz, ar penikillin pergen.
- antitachycardique** ◇ ◇ **enepkalonustead aa.** Oc'h enebiñ ouzh an ustead kalon.
- antithermique** ◇ **antithermic** ◇ **1 enepgwrez aa. 2 enepgwrezeg g. -eier** 1 Oc'h enebiñ ouzh ar genel gwrez pe o leiaat ar gwrezverk. 2 Gwezher enepgwrez.
- antithrombine** ◇ **antithrombin** ◇ **trombindolc'her g. -ioù** Danvezenn vonan pe gleñvedel oc'h enebiñ ouzh furmidigezh ar fibrin diwar ar fibrinogen dindan wered an trombin; trombindolc'herioù naturel, bevenaozet en avu, ha danzeadel a ziounezer evel enepkaoulederioù.
- antithrombotique** ◇ **antithrombotic** ◇ **1 eneptromboz aa. 2 eneptrombozeg g. -eier** 1 Oc'h enebiñ ouzh an tromboz. 2 Lia eneptromboz, sk. : an enepkaoulederioù, an trombindolc'herioù, ar pladanharzerioù (sl. *anti Xa*).
- antithyroïdien, thyrostatique** ◇ **antithyroid** ◇ **1 skoedisvorc'her aa. 2 skoedisvorc'her aa. -ioù** 1 O skoilhañ ouzh gwerederezh ar wagrenn skoed, eleze ouzh furmidigezh an hormonou skoedel. 2 Danvezenn skoedisvorc'hañ; ar skoedisvorc'herioù kevanaoz a skoilh ouzh bevenaoz an tiroksin.
- antitoxine** ◇ **antitoxin** ◇ **antitoksin g.** Antikorf spesadel d'un toksin, gantañ ar galloud d'e ezniñvañ.
- antitragus** ◇ **antitragus** ◇ **advouc'h g.** Tosenn vihan eus talbenn arak pleg ar skouarn, loet a-is d'an adc'hourenn hag a-dreñv d'ar bouc'h, rannet diouzh hemañ gant an ask etrebouc'hel.
- antituberculeux** ◇ **antituberculosus** ◇ **1 eneptorzhelleg aa. 2 eneptorzhelleg g. -eier** 1 Oc'h enebiñ ouzh an dorzhellegezh, diouzh un tu ar vaksin eneptorzhelleg, pe BCG, diouzh an tu all ar bevastalerioù. 2 Lia eneptorzhelleg.
- antitussif, béchique** ◇ **antitussive** ◇ **1 eneppez aa. 2 eneppezeg g. -eier** 1 O tistav ar paz. 2 Lia eneppez.
- antityphoïdique** ◇ **antityphoid** ◇ **eneptifoid aa.** Oc'h enebiñ ouzh an tifoid, sk. : *vaksin eneptifoid*.
- antiulcéreux** ◇ ◇ **1 enebangreizh aa. 2 enebangreizheg g. -eier** 1 Oc'h enebiñ ouzh an angreizh (kreuz-daouzegenn). 2 Lia enebangreizhek, sk. : an eneptrenkeier (enephistamineier H2, heuderoù ar porzher proton).
- antivaricelleux** ◇ ◇ **enepbrec'hniñ aa.** Oc'h enebiñ ouzh ar vrec'h niñ, sk. : *vaksin enepbrec'hniñ*.
- antivenimeux : vaccin ~** ◇ ◇ **vaksin g. -où enepbinim** Gwadveiz o tont eus kezeg dreisthangaeet ouzh binim naered, diounezet evel hangaeüzenn c'houzañvat spesadel.
- antiviral** ◇ **antiviral** ◇ **1 enepviruz aa. 2 enepviruzeg g. -eier** 1 Oc'h enebiñ ouzh ar viruzoù. 2 Gwezher enepviruz; diforc'h a reer ar gwezherioù viruzlazh (dilesterioù ha dilouzerioù, evel an dour javell) hag ar viruzharzerioù, o skoilhañ ouzh neridigezh ar viruz.
- antivitamine** ◇ **antivitamin** ◇ **vitamindolc'her g. -ioù** Danvezenn o skoilhañ ouzh gwered ur vitamin.
- antivitamine K, AVK** ◇ **oral anticoagulant** ◇ **vitaminKdolc'her g., enepkaouleder g. genaouel** Rumm gwezherioù enepkaouledin, gourzhalerioù ar vitamin K, ampleget gant avuenaoc'z enzimoù ret d'ar c'haouledin : ar parennoù II (protrombin), VII (prokonvertin), IX (paren enephefiolek), X (paren Stuart).
- antixénique** ◇ **antixenic** ◇ **eneballev aa., allevarher aa.** Oc'h enebiñ ouzh an danvezennou allevek.
- antixérophtalmique** ◇ **antixeropthalmic** ◇ **enepkseroftalmek aa.** Oc'h enebiñ ouzh ar kseroftalmiezh war-benn he c'hurañ pe he ergurañ (dre ziounit vitamin A, anvet gwechall *akseroftol*).
- antrectomie, antro-pylorectomie** ◇ **antrectomy** ◇ **ezvenañ ar vougev, mougevezvenañ** Dazbidañ mougev ar porzhier hag ar porzhier; an tremen a adsaveler pe dre zasforzhañ penn-ouzh-penn kreuz ha daouzegenn pe, dibaotoc'h, dre zasforzhañ kreuz ha yunegenn goude serriñ skarvenn an daouzegenn.
- 1 antrite** ◇ **antritis** ◇ **mougevfo g.** Tanijenn mougev ar vrennigenn.
- 2 antrite, antropylorite** ◇ **antritis** ◇ **treizhervougevfo g., mougevfo g.** Tanijenn mougev ar porzhier.
- antro-atticotomie, attico-antrotomie** ◇ **atticoantrotomy** ◇ **enbenañ mougev askev, mougevaskevenbenañ** Trepanañ mougev ar vrennigenn hag an askev us-taboulin.
- antroduodénostomie** ◇ **antroduodenostomy** ◇ **dasforzhañ mougev daouzegenn** Kehentaat ar vougev ha lodenn a-ziskenn an daouzegenn, gwezh surjijanel graet evit paraat ouzh angreizh oignonenn an daouzegenn.

- antromastoidite** ◇ **antromastoiditis** ◇ **mougevbrennigennfo** g. Tanijenn ar vougev hag ar vrennigenn o c'hoarvezout peurliesañ da heul ur skouarnfo krenn.
- antrotomie** ◇ **antrotomy** ◇ **mougevenbenañ** Trepanañ mougev ar vrennigenn.
- anurie** ◇ **anuria** ◇ **antroazh** g., **troazhhesk** g. Astal ar borc'hañ troazh.
- anurie excrétoire, fausse anurie** ◇ **urine retention** ◇ **troazhandegorz** g., **gaouantroazh** g. Astal an dezioulañ gant goulloù ar c'hwezhiell dre benn ur skoilh war ar san droazh; da ziforc'h diouzh an *azdalc'h troazh* diwar ur skoilh en draoñ d'ar c'hwezhiell.
- anurie sécrétoire, anurie vraie** ◇ **anuria** ◇ **troazhanvorc'h** g., **antroazh** Astal ar borc'hañ troazh; kemm a lakaer etre an *anvorc'h* (etre 0 ha 100 mL troazh borc'het dre 24 h) hag an *isvorc'h* (etre 100 ha 500 mL).
- anus artificiel** ◇ **artificial anus** ◇ **adfraezh** g. (**surjaniel**), **kolonadforzhañ** Digeriñ ar c'holon ouzh kroc'hen ar c'hof war-benn reiñ hent d'an oulennoù evit an darn vuiañ pe en holl; an holl barzhioù eus ar c'holon a c'haller adforzhañ ouzh ar c'hroc'hen, koulskoude an teir sez pennañ evit ar c'holonadforzhañ zo ar c'holon sigma (*kolonadforzhañ a-glun kleiz* pe *kolonadforzhañ sigma*), ar c'holon treuz (*kolonadforzhañ treuz*), ar sac'henn (*kolonadforzhañ sac'henn*, *sac'hennadforzhañ*); komz a reer eus *kolonadforzhañ diadu* pa vez digoret kostez ar vouzellenn hep serriñ an oaled, gant amdreugañ darnel an oulennoù; eus *kolonadforzhañ diabenn* pa vez skarvet lodenn grec'h ar vouzellenn ouzh ar c'hroc'hen hag ezvenet al lodenn draoñ (pa ambider ar youlc'h) gant amdreugañ holl el oulennoù; diabenn e vez bepred an *adfraezh garbedenn*, da heul youlc'hezevnañ.
- anus contre nature** ◇ **preternatural anus** ◇ **adfraezh anafel** Digor ezreol ar pervez ouzh ar c'hroc'hen, diseurt e sez, diwar an argerzh kleñvedel pe daraazel, o reiñ hent d'an holl pe d'an darn vuiañ eus an oulennoù, pezh a zigemm an adfraezh anafel diouzh ar *fic'h oulennel* (sl. *fistule stercoraire*).
- anuscope** ◇ **proctoscope** ◇ **anuskop** g. Endoskop reut ha berr evit engweliñ kanol ar fraezh (*fraezhengweliñ*).
- anxiété** ◇ **anxiety** ◇ **enkrez** g. Aon, padek pe c'hrezvarrek, rak un dañjer eriunell pe un dañjer gwerc'hel roet dezhañ ur pouez reñverek; ar c'hemm a glasker derchel e galleg etre *anxiété* hag *angoisse*, houmañ azonet gant erzerc'hadoù kreudel ouzhpenn, ne ziskouez ket bezañ a bouez (sl. *angoisse*).
- anxiogène** ◇ ◇ **enkreseiat** aa. O tec'han an enkrez.
- 1 2 anxiolytique 2 tranquillisant mineur** ◇ **1 2 anxiolytic 2 minor tranquilizer** ◇ **1 dienkrezer** aa., **enebenkrez** aa. **2 dienkrezer** g. **-ioù, habaskaer** g. **-ioù leiek** 1 O tistav an enkrez. 2 Gwezher arveret da zistav an enkrez; hezus a zoen bihan, e teu an dienkrezerioù da vezañ huneiat pa vuiaer an doenoù (sl. *barbituriques, benzodiazépines, méprobamate*).
- aorte à droite** ◇ **right aortic arch** ◇ **gwareg** b. **aortenn a-zehou** Kammneuziad eus gwareg an aortenn, ouzh he dilec'hiañ a-zehou.
- aorte plicaturée, pseudo-coarctation** ◇ **kinking of the aorta, buckling of the aorta** ◇ **kilwe** g. **an aortenn** Ezreolder an aortenn vrusk, raksacht ar strizh anezhi gant ar stagell dalmerel re verr; dre benn hevelep gwariadur ez a an aortenn en argein war dreñv, o kaout er skinluniñ neuz ur goudag.
- aortectomie** ◇ **aortectomy** ◇ **aortennezevnañ** Dazbidañ un darn eus an aortenn.
- aortique : foyer d'auscultation** ~ ◇ ◇ **selaouennva** g. **aortek** Lec'hienn war ar bruched ma selaouenner sac'helloù kornloarek gwask an aortenn.
- aortite** ◇ **aortitis** ◇ **aortennfo** g. Tanijenn saeoù an aortenn.
- aortographie, aorto-artériographie** ◇ **aortography, aortoarteriography** ◇ **aortennluniñ** Skinluniñ an aortenn ensinklet enni ul liñvenn demer ouzh ar skinoù X.
- aortomyoplastie** ◇ **aortomyoplasty** ◇ **kaheratelviñ an aortenn** Gwez surjaniel o c'hoarvezout a amlennañ an aortenn a-sevel pe a-ziskenn e-barzh kigenn ledanañ ar c'hein evit ma c'houlankfe houmañ, tredanfraouaet, argrezadoù da geñver an diastoloù; ur mod amredeilañ a embreger ouzh ar skorted kalon grevus.
- aortoplastie** ◇ **aortoplasty** ◇ **atelviñ an aortenn, aortennatelviñ** Gwazhiedatelviñ gwezhiat war an aortenn (sl. *angioplastie*).
- aortotomie** ◇ **aortotomy** ◇ **enbenañ an aortenn, aortennenbenañ** Digeriñ ent surjaniel an aortenn.
- apallie : syndrome** ~, **rigidité de décortication** ◇ ◇ **azoniad** g. **ar bluskenn ezkaelet, azoniad an ezkaelañ, reuted b. ezpluskennel** Steuz arc'hwelioù pluskenn an empenn da heul un daraez peurliesañ, pe ur pore; azonet eo dre ar c'homa defraouek, an ustant, ezvezañ ar fiñvoù emdarzhek.
- apareunie** ◇ **apareunia** ◇ **anembar** g. Dic'hallusted an embarañ e dianlen kammneuziadur an organoù genel benevel.
- apathie** ◇ **apathy** ◇ **ankewant** g. Gwanded ar c'hantaezañ gant digasted, ezvezañ an erwezhiñ ouzh ar fraouadoù bredel, anniñv korfel; bez' e c'hell bezañ genezhel pe arzeuat diwar skoedisvorc'h, uswask kloppenn, envedi da skouer.
- apéristaltisme** ◇ **aperistalsis** ◇ **anamdonn** g. Ezvezañ an amdonnegezh en ur parzh eus ar pervez.
- apex** ◇ **apex** ◇ **kern** b. Penn begek un organ kernennek pe germdalek, penn krec'h un elfenn, lodenn veg un elfenn a-gevenep d'al lodenn diaz.

apex orbitaire : **syndrome de l'~** ◇ **orbital apex syndrome** ◇ **azoniad g. kern ar pod lagad** Seizi eus nervennoù loc'hañ al lagad kevret gant tizhad an nervenn oftalmek hag an nervenn weled e dianlen ur yoc'henn (ur meningiom peurliesañ) evodet diwar askell vihan ar genneg.

apexite ◇ **apicitis** ◇ **kernfo g.** 1 Tanijenn eus kelli kern ar vrennigenn. 2 Tanijenn kern un organ (kalon pe skeventenn).

apexocardiogramme, apexogramme, cardiogramme apexien ◇ **apexocardiogram** ◇ **kerndresenn b. galon, kalongerndresenn b.** Kevregad diwar lerc'hwezañ tos kern ar galon ouzh speur kavenn ar bruski; dilezet eo ar mod imbourc'h-se e gounid ar stenerluniñ.

apex, apic-

• *apical, apexien* kernel, a-gern • *bruit endapexien ou apexien* trouz enlezkernel pe gernel • *cape apicale* kabell kern • *péri-apical* tro-gern • *le pôle apical des cellules* blein kern ar c'helligoù • *situé à l'apex du bourgeon d'un membre* loet e kern nov un ezel.

aphagie ◇ **aphagia** ◇ **anlonk g.** Dic'halloud lonkañ, furm eizhañ ar brelonk.

aphakie ◇ **aphakia** ◇ **anferenn g.** Ezvezañs ar ferenn, daraezel pe surjanel.

aphaque ◇ **aphakial** ◇ **1 anferennek aa. 2 anferenneg g. -eion 3 anferennel** 1 A-zivout ul lagad hep ferenn pe an den hep un pe an div ferenn. 2 Gouziviad an anferenn. 3 A-zave d'an anferenn.

aphasie ◇ **aphasia** ◇ **ankomz g., anluz g. teodel** Anvad rumm direizhoù al lavar diwar anafoù en dolbezenn ividig pe e trede troenn dal an hanterenn drec'hel.

aphasie amnésique ◇ **amnesic aphasia** ◇ **anenluz g. arbezhel** Furm leiek eus an ankonz enluzañ (ankonz Wernicke) azonet gant ankonz don pe zonoc'h an anvioù.

aphasie de Broca, aphasie motrice, aphémie ◇ **Broca's aphasia, motor aphasia, frontocortical aphasia, aphemia, logaphasia, ataxic aphasia** ◇ **ankonz Broca, ankonz ezluzañ, anezluz g.** Furm ankonz ma sour an ezluzañ (ec'hodiñ al lavar teodel) hep ma ve tizhet, ac'hoel tizhet bras, an enluzañ (meizañ al lavar klevet); devoudet e vez gant anafoù e tiriad talmerenn grenn an empenn; aozerion 'zo a ziforc'h an *anezluz (aphasie motrice)* "pur", hennad goubarel, diouzh *ankonz Broca*, anezluz kemmesket gant azonoù anenluz.

aphasie de conduction ◇ **conduction aphasia** ◇ **ankonz rehentel, ankonz gereilañ** Furm ankonz devoudet gant un anaf eus ar forzhioù nervren etre leur Broca ha leur Wernicke, naouus dre an dic'halloud da zianeilañ ar gerioù (azlavarout gerioù war-lerc'h an imbourc'her).

aphasie de Wernicke, aphasie sensorielle ◇ **Wernicke's aphasia, sensory aphasia, impressive aphasia, receptive aphasia, temporoparietal aphasia, logamnesia** ◇ **ankonz Wernicke, ankonz enluzañ, anenluz g.** Furm ankonz o c'hoarvezout eus koll ar galloud da enluzañ (intent ar sonioù, ar skridoù hag ar meidoù) gant an azlammoù diwarnañ e kant an ezluzañ (kammgomz, jagouilherez); devoudet e vez gant anafoù ar rannbarzh kitem-ividig kleiz; aozerion 'zo a ziforc'h an • *anenluz (aphasie sensorielle)* "pur", hennad goubarel, diouzh *ankonz Wernicke*, anenluz kevret gant azlammoù ezluzel.

aphasie des Signes ◇ **Sign language aphasia** ◇ **anluz meidel** Furm ankonz o tizhout al lavar meidel, devoudet gant an un anafoù hag an anluz teodel.

aphasie sous-corticale ◇ **subcortical aphasia** ◇ **ankonz danbluskennel** Ankonz devoudet gant un anaf loet dindan pluskenn an empenn.

aphasie totale ◇ **total aphasia** ◇ **ankonz hollel, anezluz-anenluz g., peuranluz g.** Kevreted ankonz Broca hag ankonz Wernicke.

aphonie ◇ **aphonia** ◇ **anvouezh g.** Koll klok pe damglok eus ar vouezh, naouus dre wander ar read hag ar gouluzañ pe dre an dic'halloud da ec'hodiñ ur son; devoudet e vez gant un anaf pe gant seizi organ ar mouezhparañ.

aphone ◇ **voiceless** ◇ **anvouezhiek aa.** Gant an anvouezh.

aphrodisiaque ◇ **aphrodisiac** ◇ **1 orgeteiat aa. 2 orgeteiad g. -où 3 uc'horgedek aa. 4 uc'horgedel aa.** 1 O tefraouiñ hag o kontraouiñ ar c'hoant revel. 2 Gwezher orgeteiat. 3 Gant an uc'horged. 4 A-zave d'an uc'horged.

aphrodisie ◇ **aphrodisia** ◇ **uc'horged g.** Reñver ar c'hoant revel.

aphte ◇ **aphtha** (l. : **aphthae**) ◇ **aftenn b.(l. : aftoù)** Anaf glaourgenn ar genoù pe an organoù revel, anezhañ ur c'houliez vihan kelc'hiek, arvelen e oueled, ruz e wrimenn, laurus bras, steuzidik, oc'h emdreñ a-fracadoù.

aphteux ◇ **aphthous** ◇ **aftus aa.** A-zave d'an aftoù.

aphteux : fièvre ~se, syndrome pied-bouche ◇ **foot and mouth disease** ◇ **terzhienn b. aftus, azoniad g. troadgenoù** Kleñved tredizhus ha darreuziat ar bioù, devoudet gant ur viruz, naouus dre zispuilhadoù aftoù war glaourgenn ar genoù hag an tevezioù; treuzkasadus eo d'an deñved, d'ar c'hon, d'ar moc'h ha, dibaot kaer, d'an denion; gant ar re-mañ e vez kuñv ha tizhout a ra ar genoù, an daouarn hag an treid.

aphtose ◇ **aphthosis** ◇ **aftoz g.** Anez naouus dre un dispuilhad aftoù war ar glaourgennoù hag ar c'hroc'hen, oc'h emdreñ dre frapadoù adfeilhus, a-wechoù o tec'han anafoù grevus en daoulagad hag oc'h astenn d'ar gwazhiennnoù, d'an nervennoù ha d'an arzoù; div furm a zeskriver : an *aftoz bras* (sl. *maladie de Behçet*), an *aftoz boutin*, a erdeb kuñv.

aphylaxie ◇ **aphylaxis** ◇ **anergost g.** Ezvezañs a ergost, eleze a c'halloud emzifenn a-berzh ar bevedeg ouzh ar poreadoù (sl. *phylaxie*).

apicolyse ◇ **apicolysis** ◇ **kernezglenañ** Gwezh surjiane anezhañ loezañ ar glenelloù etre div feilhenn ar c'hrezoù ouzh kern ur skeventenn evit devoudañ ar flakadur anezhi.

apituitarisme ◇ **apituitarism** ◇ **anvorc'h g. ar c'hougorfenn** Arsav bore'hañ ar c'hougorfenn.

aplasie ◇ **aplasia** ◇ **angwe g.** Arsav an diorreadur o c'hoarvezout gant ur gwriad pe un organ a-raok pe goude ar c'hanedigezh; ezvezañs klok an diorreadur eo an appar (sl. *agénésie*).

aplasique, aplastique ◇ **aplastic** ◇ **1 angweek aa. 2 angweel aa.** 1 Gant an angwe. 2 A-zave d'an angwe.

aplasie

- *aplasie vaginale* gouinangwe.

aplati

- *aplatissement* arblated • *cavité virtuelle aplatie* kavenn vannek arblat • *cellules aplaties* kelligoù arblat • *racine aplatie* gwrizienn arblat.

apnée ◇ **apnoea** ◇ **harzanal g. -où** Astal hir pe hiroc'h, diarvenn pe get, amzeriat pe dieiltro eus kor an anal.

apnée : syndrome des ~s du sommeil ◇ **sleep apnoea syndrome** ◇ **azoniad harzanaloù kousked** Anvad rumm straufuilhoù ar gwenterezh o c'hoarvezout er c'houked : anal trovezhiek, astaloù analañ, harzanaloù marvus, a-wechoù a zevouderezh nerval, peurliesañ dre steviadur (drekkouezh an teod); pennañ elfenn azoniad Pickwick eo an harzanaloù kousked.

apnéique ◇ ◇ **1 harzanal g. aa. 2 harzanal b. aa.** 1 Gant an harzanal. 2 A-zave d'ar harzanal.

apneustique : centre ~ ◇ **apneustic center** ◇ **kreizenn b. heudanal** Bodad nervelligoù loet er pont a zo o gwered skoilhañ ouzh an ec'hanalañ.

apo-enzyme ◇ **apoenzyme** ◇ **apoenzim g.** Rann broteek an enzimoù heteroproteinek; an apoenzim eo a ampar spesadelezh pep enzym hag a zesavel buanez an treluskañ.

apocrine ◇ **apocrine** ◇ **kernezvorc'hat aa.** A-zivout ur wagrenn a zifreg kern he c'helligoù en ur gas ganti dedaolad ar borc'hañ; etreat eo d'ar gwagrennoù largezvorc'hat ha pizhezvorc'hat (sl. *holocrine, mérocrine*).

apomorphine ◇ **apomorphine** ◇ **apomorfin g.** Alkaloid deveret diouzh ar morfin arveret evel c'hweluzenn.

aponévrectomie ◇ **aponevrectomy** ◇ **ezvenañ lienstirenn, lienstirennenezvenañ** Dazbidañ ul lienstirenn; gwezh surjiane embreged da gurañ kleñved Dupuytren.

aponeurose ◇ **aponeurosis** ◇ **lienstagrenn b.** Lienenn wenn, gweyn, furmet diwar wiennoù kenglenel daskroaziet; kemm a lakaer etre al *lienstagrennoù amwiskañ* o c'holeñ ar c'higennoù hag al *lienstagrennoù enlanañ*, anezho stirennoù ar c'higennoù plat.

aponevrosite ◇ **aponeurosis** ◇ **lienstagrenn g.** Tanijenn ul lienstirenn.

aponevrotomie ◇ **aponeurotomy** ◇ **enbenañ ul lienstirenn, lienstirennenbenañ** Skejañ surjiane ul lienstirenn.

apophysite, apophyose ◇ **apophysitis** ◇ **balegfo g.** Tanijenn ur baleg, anezhi peurliesañ ur mideñv kreskiñ, da skouer *balegfo torosenn ar skin* (kleñved Lannelongue) a dizh ar baotred etre 10 ha 15 vloaz hag a bare hep arlenad.

apoplexie ◇ **apoplexy** ◇ **1 taol g. gwad, orc'had g. empenn 2 orc'had g. -où 3 orc'had, amfuad g. -où** 1 (Arver dispredet) darvoud kleñvedel trumm naouus dre goll ar genskiant hag an arc'hweleoù uhelañ diwar un darvoud gwazhiedel empenn, boukadur pe wadliñv (sl. *accident vasculaire cérébral*). 2 An orc'had empenn o vezañ alies un naoued gwadliñvel, ez eo bet astennet arver an termen *apoplexie* ha, da heul, *orc'had* d'ar gwadliñvoù lemm o c'hoarvezout e diabarzh gwiadoù hael an organoù (*gwadliñvoù haelwiadel*) : *orc'had al luc'hsae*, *orc'had ar skevent*, h.a. 3 (Arver dibaot) tachad marvenn wadliñvel diwar ensiladur lec'hiek an hemati (pe ruztregen), dizalc'h diouzh anforzh ur wazhiedenn, devoudet gant ur strafuilh arc'hwelel en amred ar gwad evelkent (sl. *infarctus*).

apoplexie utéroplacentaire, apoplexie utérine, syndrome de Couvelaire, hématome rétroplacentaire ◇ **uterine apoplexy** ◇ **gwatoñv g. drektorzienn, orc'had krozhorzienn** Azoniad o tarvezout trumm gant ar vaouez vrazez e mizioù diwezhañ ar vec'hiegi pe e-kerz ar gwentloù, naouus, ent klinikel dre ul laur kof, gwadliñv ar grozh, ur frapad uswask talmerel, ur bleuz, proteinvec'h en troazh, ent neuziadurel dre ur gwatoñv o tifloskañ an dorzienn diouzh speur ar grozh; grevus kenan eo an erdeb evit ar grouell, grevus evit ar vamm dre benn ar gwadliñv hag ur riskl a varvenn a 'l louezhi.

apoptose ◇ **apoptosis** ◇ **apoptoz g.** Emzistruj ar c'helligoù, hile'houlevet ha n'eo ket devoudet gant ur c'heuziad evel ma 'z eo ar varvenn.

apozème ◇ **apozem** ◇ **dourlouzoù g. -eier, apozem g. -où** Mestrangevezh a wechall, anezhañ dour karget dre vezhiañ, glec'hiañ pe anverv a wezhuzennoù struzhel hag o talvout da ambrougenn da zanvezzennoù apotikel.

appareil ◇ **1 apparatus 2 apparatus, brace, device, splint** ◇ **1 benvegad g. -où 2 ardivink g. -où, steudell b. -où, amsteudell b. -où, tint g. -où, savnell b. -où, kavnell b. -où, harpell b. -où, stignadell b. -où, fram g. -où** 1 Teskad organoù o kendaol d'un arc'hwel. 2 Anvad rumm evit an teskadoù pezhioù metal, mezell, prenn, ler, lien amkanet da harpañ, arzerc'hel pe amsaviñ ul lodenn eus ar c'horf (sl. *aide fonctionnelle, orthèse, prothèse*).

appareil activo-passif ◇ **mechanotherapy apparatus** ◇ **ardivink oberiatgouzañvat** Ardivink treloc'hyac'haat o kevaraezañ ur fiñv gouzañvat diwar-bouez ur fiñv oberiat.

appareil à frondes ◇ **traction splint** ◇ **amsteudell dastennañ** Stignadell graet gant senklennoù ler kevreet dre boelloù dastennek evit dereizhañ ar c'hammemstummoù kenvele ha war un dro embreger ar c'higennoù rediet da stourm ouzh an harzderioù dastennek.

appareil correcteur progressif ◇ **gradual correcting brace** ◇ **harpell dereizhañ pazennek** Steudell, plastret peurliesañ, evit diren kammemstumm pe isheled ur c'henvell.

appareil de contention ◇ **resting splint** ◇ **tint gourfaouez, steudell disloc'h, disloc'hell** b. -où Steudell sonn evit derec'hel difiñv ur parzh eus ar c'horf war-benn aesaat parañ un anaf pe dereizhañ un distummadur; *kavnell disloc'h* a reer eus ar steudell oc'h ober tro ur parzh ezel, *savnell disloc'h* eus ar steudell o kavellañ ar parzh ezel (sl. *gouttière*).

appareil de suspension ◇ **suspension frame** ◇ **framm skourrañ** Ardivink arloet ouzh un ezel war-benn enebñ ouzh gwered ar ponnerder hag aesaat embreger ar c'higennoù.

appareil juxta-glomérale ◇ **juxtaglomerular** ◇ **benvegad nes-bloueig** Furmader loet e blein gwazhiedel ar bloueig lounezh, anezhañ a) an talmerennigoù degas hag ezkas, b) ar c'hondre blein graet gant daou seurt kelligoù, greunigoù hag angreunigoù, c) ar *macula densa*.

appareil orthopédique ◇ **orthosis** ◇ **ardivink korfeunañ, eeunell** b. -où Anvad rumm evit an amsteudelloù, an ersteudelloù hag ar steudelloù plastret.

appareil pelvi-pédieux ◇ **long brace with pelvic band** ◇ **steudell lestrtroad** Steudell, peurliesañ plastret, o tisloc'hañ a-unan al lestr hag un ezel traoñ.

appareil psychique ◇ **psychic apparatus, mental apparatus** ◇ **benvegad bred** Leterc'had savet gant Freud da arouezañ ar bred e kement ma c'hoarvez a reizhioù kenereet, ma ren "labour" ha ma treuzfurm "gremm".

appareil thoraco-pédieux ◇ **long leg brace with back brace** ◇ **steudell vrusk-troad** Kenstroll sonn un harpell gef hag amsteudelloù ezel traoñ.

appareil : grand ~ ◇ **long leg brace with back brace** ◇ **steudell vras** Kenstroll div amsteudell vorzhed-gar gant ur gorfkenn pe ur gouriz divlez, an daou damm o vezañ kenvellet.

appareillage ◇ **bracing, fitting** ◇ **1 steudellañ 2 steudelladur** g. 1 Arloañ ur steudell ouzh ul lodenn eus ar c'horf. 2 Teskad ar steudelloù (amsteudelloù, ersteudelloù, steudelloù plastret hag, evit aozerion 'zo, an harpoù arc'hwelel).

appareillage : petit ~ ◇ ◇ **steudelladur bihan** Stignadoù eeun peurliesañ ha marc'hadmat o tanveziañ dafar skañv evit oberiañ amsteudelloù bihan.

appareil(-)

- *appareil buccal des Arachnidés* benvegad genoù an Araknideged
- *appareil cruro-jambier* steudell vorzhed-gar
- *appareil cruro-pédieux* steudell vorzhed-troad
- *appareil de marche* steudell vale
- *appareil glandulaire pilo-sébacé* benvegad gwagrennel blev-soav
- *appareil ischio-pédieux* steudell goazez-troad
- *appareil locomoteur* benvegad emzilec'hiañ
- *appareil utilisé pour examiner* benveg imbourc'hiñ
- *appareil valvulaire pulmonaire* benvegad an trapigoù a-skevent
- *appareillage orthodontique* steudell denteeunañ
- *appareils d'anesthésie* binviadur diereziñ.

apparenté

- *corps de structure apparentée à celle des imipramines* korf nes e luniad da hini an imipramineier
- *substances immunologiques apparentées* danvezennoù kerentiet ent hangaeel.

apparten-

- *appartenant à la classe des Cestodes* gougevret ouzh renkennad ar C'hestod.

appendicectomie ◇ **appendicectomy** ◇ **ezvenañ divilhenn, divilhennezvenañ** Dilemel ent surjanel an divilhenn breñvek.

appendicite ◇ **appendicitis** ◇ **divilhennfo** g. Tanijenn an divilhenn breñvek.

appendicocèle ◇ **appendicocele** ◇ **divilhennogad** Aveleñ an divilhenn breñvek.

appendiculaire ◇ **appendicular** ◇ **divilhennel** aa., ~ **divilhenn, divilhenn-A**-zave d'an divilhenn breñvek.

append-

- *appendu à un canal excréteur* a-ispilh ouzh ur ganol degorzhañ
- *colique appendiculaire* divilhennost
- *point appendiculaire* poent divilhenn.

appertisation ◇ **appertization** ◇ **apertaat** Kalvezder mirerezh ar bouedoù kollidik dre o zommañ e-barzh listri peurgloz war-benn o dishadennañ.

appétit ◇ **appetite** ◇ **1 avez** g. -ioù **2 ilboued** g. 1 C'hoant d'un dra en areaz da walc'hañ un ezhomm. 2 Avez e-keñver ar boued.

applic-, appliqu-

- *administré en applications locales* diounezet dre arloadurioù lec'hiek
- *appareil utilisé pour détruire le tissu auquel il est appliqué* ardivink arveret da zistrujañ ar gwiad en arloer outañ
- *applicable* arloadus
- *application d'un appareil sur un segment du corps* arloañ ur steudell ouzh ul lodenn eus ar c'horf
- *application d'une méthode de traitement* dedalvezadur un hentenn vezegañ
- *appliquer un stimulus à une oreille* arloañ ur c'hentrigad ouzh ur skouarn
- *appliquer une source radioactive au contact d'une*

lésion arloañ ur vammenn skinoberiek e diastok un anaf • *durée d'application du courant* pad arloañ ar red tredan • *lamelles osseuses immédiatement appliquées les unes contre les autres* lavnennoù askorn, harpet start an eil re ouzh ar re all • *médicaments appliqués sur le tissu nerveux* gwezherioù arloet ouzh ar gwiad nerval • *relation physicochimique applicable à une solution idéale* daveadur fizikel-kimiek arveradus evit un dileizhenn derc'hek • *substance chimique susceptible de détruire les tissus au niveau de son lieu d'application* danvezenn gimiek en araez da zistrujañ ar gwiadoù el lec'h m'he arloer • *utilisé en applications* danvezet diwar-bouez arloadurioù.

appoint

• *circulation pulmonaire d'appoint* amred skevent klokaat.

apport de sécurité ◇ **safe level of intake** ◇ **feur g. kemberad diogel, kemberad g. diogel** Kementad protid a ranker euvriñ evit gwalc'hañ ezhommoù ar beved hag arzerc'hel ar yec'hed, feur jedet e par ur stroll tud lavaret.

apport

• *carence d'apport et carence d'utilisation* negez enankañ ha negez danveziñ • *somme arithmétique des apports et des pertes d'une substance donnée* sammad niveroniell an enankadoù hag an ec'hankadoù eus un danvezenn lavaret.

apprécier

• *apprécier la rétention du colorant dans les tissus* andalañ lendalc'h al livuzenn ebarzh ar gwiadoù.

appréhender

• *appréhender deux sensations distinctes d'un même stimulus* dec'havaelañ div eraezadenn diforc'h evit an un kentrigenenn.

approximation

• *recherche de l'objet par approximations successives* c'hwiliñ davit an ergorenn diwar-bouez arnesadoù.

appui

• *points d'appui normaux* poentoù harp reol.

approbatif ◇ ◇ **kemmouezh aa., kemmouezhius aa.** Gant ar gemmouezh.

approbativité ◇ ◇ **kemmouezh b., kemmouezhiusted b.** Tued bred naouus dre an asant a ro raktal ar gouzrec'h da gement lavarezh o tont gant e genbrezeger, eztaolet alies e ser an drec'heilañ hag ar meidiñ bloc'heiladec a-strak ha trouzus, oc'h azonañ an hec'houdro pe, alies, an diouer a bep meno; azon bezant e bredanaezioù evel al labanded, an envedi gozhiadel, ar mania.

apracto-agnosie, apractognosie ◇ **apractognosia** ◇ **andigon-andenaoud g.** Andigon kevret gant an andenaoud.

apractophagie ◇ **apractophagia** ◇ **andigon lonkañ, lonkandigon g.** Azon nerval, koll ar galloud da lonkañ daoust ma chom reol an arc'hwelioù loc'hañ, santout hag an damougoù.

apragmatique ◇ **apragmatic** ◇ **angwerc'hadek aa.** Gant an angwerc'hadegezh.

apragmatisme ◇ **apragmatism** ◇ **angwerc'hadegezh b.** Azon bredel, koll ar galloud da embreger oberoù diouzh un amkan, hag eñ termenet ha c'hoantaet gant ar gouzrec'h.

apragmatisme sexuel ◇ **sexual apragmatism** ◇ **angwerc'hadegezh revel** Dic'houested da ren ur gread revel, dre zigasted pe dre zic'halloud da savelañ un darempred ouzh an hentez.

apraxie ◇ **apraxia** ◇ **andigon g.** Azon nerval un anaf en dolbezenn gitem, anezhañ koll ar galloud da azasaat ar fiñval diarvenn diouzh ur pal, ent dizalc'h diouzh nep gouzezi pe ankedre, diouzh ur strafuilh eus an eraeziañ ha diouzh un direizh bred; ar fiñval diarzoug a chom distrafuilh pe nebeut strafuilhet.

apraxie constructive, apraxie géométrique ◇ **constructional apraxia** ◇ **andigon luniañ** Bec'h o kas da benn luniadurioù div pe deirmentek (tresañ ur c'harrez, stummañ un diñs, skrivañ); ar gouzrec'h a zaznavez al lunioù nemet e vez dic'houest d'o hanelañ.

apraxie idéatoire ◇ **ideational apraxia** ◇ **andigon arverañ** Bec'h o kas da benn fiñvadoù diarvenn trazeat, eleze diwar-bouez traezoù, (distouvañ ur voutailh, strakañ ur sklosenn hag enaouiñ ur c'houlouenn).

apraxie idéomotrice ◇ **ideomotor apraxia** ◇ **andigon argelañ** Bec'h o kas da benn fiñvadoù diarvenn antrazeat, eleze na angorzhont ket traezoù, argelel (sin ar groaz, salud soudard), pe darvanel (ober van da sankañ un tach, da c'hoari violoñs).

apraxie buccofaciale ◇ **facial apraxia** ◇ **andigon genoù-dremm** Bec'h o kas da benn ent diarvenn jestroù gant kigennoù an dremm hag ar genoù (disteodiñ, serriñ an daoulagad, c'hwitellat).

apraxie oculomotrice ◇ **oculomotor apraxia** ◇ **andigon lagadloc'hañ** Na c'hallout durc'haat ar sell ent diarvenn, hep ma ve seizi kigennoù loc'hañ an daoulagad.

apraxique ◇ **apraxic** ◇ **1 andigonek aa. 2 andigoneg g. -eion 3 andigonel aa.** 1 Gant an andigon. 2 Gouziviad an andigon. 3 A-zave d'an andigon.

aproctie ◇ **aproctia** ◇ **anfraezh g.** Ezvezañs c'hanedigel ar fraezh.

aprosexie ◇ **aprosexia** ◇ **ansip g.** Azoniad o c'hoarvezout eus gwanded ar c'hounerezh, distabilded an evezh ha diegi an dezeverezh.

aprosodie ◇ **aprosodia** ◇ **andarlez** g. Koll an darlezañ, eleze an naousterioù sonel o tasperzhiañ en arc'hwelioù ar gomz : uc'her, read, pad ar sonioù, doareoù sonerezhel steuñvenn ar prezeg ; gant kleñved Parkinson e c'hoarvez peurliesañ an andarlez ; da ziforc'h eo diouzh ar mizarlez, azon ankonz Broca (sl. *dysprosodie*).

aprosopie ◇ **aprosopia** ◇ **andremm** g. Euzhegezh, anezhi arzhelidigezh tolzenn greiz ar fas.

aptitude médicale au travail ◇ **medical capacity for work** ◇ **araezegezh yec'hedel da labourat** Disentez a-berzh ar mezeg o testiñ ez eo gouest ur goprad da zerc'hel ar stael-mañ stael hep riskl evit e yec'hed hag e surentez nag evit yec'hed ha surentez ar re all.

apt-

- *apte à provoquer la conglutination* da berzh dezhañ dec'han ar c'hengludadur
- *apte à susciter une réponse immunitaire* en araez da zec'han un erwezh hangaeñ
- *aptitude à s'immuniser contre les antigènes* gouested da hangaeñ ouzh an antigenoù
- *aptitude des antigènes à provoquer la formation d'anticorps* araezusted an antigenoù da zevoudañ furmidigezh an antikorfoù
- *rendre apte à la fécondation* lakaat en araez da frouezhigiñ.

aptyalisme, asyalie ◇ **aptyalia, aptyalism** ◇ **anvorc'h** g. **halv, halvanvorc'h** g., **anhav** g. Ezvezañs ar borc'hañ halv (sl. *xérostomie*).

APUD : cellules ~, système ~ ◇ **APUD cells, APUD system** [**APUD = Amine-Precursor-Uptake and Decarboxylation**] ◇ **kelligoù** l. (b.) **APUD, reizhiad** b. **APUD** Kelligoù bezant e lies organ : empenn (gouzerc'hvel, rakgougorfenn), gwagrennoù enborc'hañ (ilgreiz, skoedenn, kelligoù kromlen), kelligoù enborc'hañ ar ganol vezhur ; borc'hañ a reont hormonou (ACTH, glukagon, gastrin) ; loet e-maez ar gwagrennoù enborc'hañ, ez amparont ur *reizhiad enborc'hañ strewek*.

apudome ◇ **apudoma** ◇ **apudom** g. Yoc'henn evodet diouzh ar c'helligoù APUD.

apurinique ◇ ◇ **diburin** aa. Na endalc'h ket purin ; ar reol voued diburin a erskriver ouzh an urloù.

apyrétique ◇ **apyretic, apyrexial, afebrile** ◇ **1 angwresterek** aa., **angwres** aa., **diderzhienn** aa. **2 angwresterel** aa. 1 (Gouziaviad) hep terzhienn. 2 (Kleñved) hep terzhienn.

apyrexie ◇ **apyrexia** ◇ **angwrester** g., **diderzhienn** g. Ezvezañs an derzhienn.

apyrétogène, apyrogène ◇ **apyrogenic** ◇ **angwresterus** aa. Na zec'han ket terzhienn.

aquarium : maladie des ~s, maladie des aquariophiles ◇ **fish tank granuloma** ◇ **kleñved ar pesklennoù, kleñved ar pesklennourion, granulom ar pesklennoù** Mikobakterioz kroc'hen an daouarn gant an dud a ra war dro ar pesklennoù ma vager pesked arallhin douger hadennoù.

Arachnidés ◇ **Arachnoids** ◇ **Araknideged** l. (g.) Artropod douarat oc'h analañ dre ur vrian pe dre ar c'hroc'hen, naouus dre ar vezañs eus bac'higoù genaouel, dezho ur c'horf div lodenn : an eil, diaraok, pe kefalotoraks, outañ ar benvegad genoù ha pevar re baviou, eben, diadrefiv, pe abdomen, kenvellet pe get gant ar c'hefalotoraks ; gougevret ouzh renkad an Araknideged emañ urzhadoù ar C'hevuid, ar C'hruget, al Linguatul hag an Akarianed.

arachnidisme, aranésme ◇ **arachnidism** ◇ **kevnidigenn** b. Anaev diwar vrazhad ar c'hevuid.

arachnidisme cutané ◇ **cutaneous arachnidism** ◇ **kevnidigenn groc'hen** Kevnidigenn dezhi derezioù grevusted, adalek an tanañlec'hel betek ar gouliñv marvennek.

arachnidisme nerveux ◇ **nervous arachnidism** ◇ **kevnidigenn nervel** Kevnidigenn azonet gant ul laur kriz e lec'h ar flemmad, laur oc'h astenn d'ar c'horf a-bezh, heuliet gant glizi, dargrezadoù hag usdamoug, kren ha gouzeizi a'n eizhaennoù, dulaz, iswask, trec'hwezhañ ha seizi analadel o tisoc'h a-wechoù gant ar marv.

arachnoïdite ◇ **arachnoïditis** ◇ **kevnidigenno** g. Tanienn lemm pe henek ar bilhonenn gevniked o tec'han glenelloù ha kistoù ma yoc'h al liñvenn benn-kein.

arachnoïdocèle ◇ **arachnoïdocele** ◇ **ogad** g. **ar gevnikedenn, ogad kevniked** Avelenn ar gavenn endan-gevniked.

arbovirose ◇ **arbovirosis** ◇ **arboviroz** g. **-ioù** Anvad rumm ar c'hleñvedoù trovanel pe goudrovanel diwar arboviruzoù, azonet gant an derzhienn hag an arzostou (deng, terzhienn draoñienn ar Rift), ar gwadliñvoù (terzhienn velen, terzhienn Gorea), an empennfo (empennfo St-Louis, empennfo japanat) ; dibaot en o stader en Europa (empennfo kosat, empennfo kreizeuropat).

arbovirus, virus arbor ◇ **arbovirus** [**ARthropod BORn VIRUS**] ◇ **arboviruz** g. **-où** Stroll viruzoù o neriiñ e bevedeg artropod gwadezat (moustiked, tarlask) ha treuzkaset dre vrazhad ar re-mañ d'ar mellkeinged.

arbre, arbor-

- *arborisation des canalicules* bleñchennadur ar c'hanoligoù
- *arbre bronchique* skoultrig ar bronkez
- *arbre trachéobronchique* skoultrig briant-bronkez.

arcs aortiques, arcs artériels ◇ **aortic arch arteries** ◇ **gwaregoù** l. (b.) **aortek, gwaregoù talmerel** C'hwec'h re wazhiend eus rannbarzh araok ar rizhell o keneren an aortennoù kein ha kof ; diouto e tever ar reizhiad karotidel, gwareg an aortenn, an dalmerenn endan-drebez, talmerennoù ar skevent hag ar san dalmerel (sl. *arche de l'aorte*).

arc aortique double ◇ **double aortic arch** ◇ **divwareg** b. **aortek** Gwariadenn e diorren ar gwaregoù aortek, anezhi trebad ar 4^e gwareg dehou, loet kemparzh d'ar 4^e gwareg kleiz, ken ma tisoc'h div wareg aortenn oc'h engronnañ ar vrian hag an treizher e-barzh ur walenn dalmerel kloz ; diouzh an div wareg e tinod pep a garotidenn voutin hag a dalmerenn endan-drebez.

arc dentaire ◇ **dental arch** ◇ **dentwal** b. -où Garenn vetal darstummet diouzh talbenn a-rakkambr kurunennoù an dent, arzalc'het diwar-bouez liammoù metal etredental; pa vez desezet pep a zentwal war an div aven, e c'haller o c'henstagañ dre greierigoù hag e se kas da benn ar c'hlaviañ etreavenel.

arc lipoidique ◇ **arcus lipoides** ◇ **gwalenn** b. **lipidel** Gwrimenn c'hlaswenn danvezennoù lipidel en dro d'ar gornsa; bezant en trede oad, hag ivez gant an oadourion yaouank kolesterolusvec'hiek.

arc sénile, gérontoxon, gérontotoxon, xanthome cornéen ◇ **arcus senilis** ◇ **gwalenn gozhiadel** Gwalenn lipidel an trede oad.

arc mandibulaire, bourgeon mandibulaire ◇ **mandibular arch** ◇ **nov g. chagellel, gwareg chagellel** Kentañ gwareg vrenkel a egino diouti ar morzhol, an annev, migorn Meckel ha kigennoù ar chaokat.

arc maxillaire, bourgeon maxillaire ◇ **maxillar arch** ◇ **nov karvanel, gwareg karvanel** Nov e rezh un erien diadrez loet a-hed parzh a-glopenn ar stomodeom.

arche ◇ **arch** ◇ **gwarenn** b. Unan eus al luniou a gaver gant kribennoù an ezkroc'hen war vegoù ar bizied, war ar c'houvozen hag ar c'hourbozen.

arche de l'aorte, crosse de l'aorte ◇ **aortic arch** ◇ **gwareg b. an aortenn** Kentañ parzh an aortenn etre ar c'hofig kleiz hag ar pevare mellenn vrusk.

archée* ◇ **archaeae** ◇ **arke** s. Garvevion unkellig, prokariot, o ment er gavael 0,1 da 15 µm, dezho naousterioù bevgimiek, kennevidel ha molekulel ouzh o diforc'hañ diouzh ar pokarioted all (bakteri). Desellet e-pad pell evel bakteri, diforc'hekaet eo bet an arke diwar-bouez elfennadurioù hilel ha hildarzhel. Ar bevedegoù-se n'o deus nemet ur c'hromozom kelc'hiek, hogen en areaz ez int da gaout plasmid. An darn vrasañ n'int tiñvadus en imbourc'hva, nemet en amveziadoù dibarek kenan. Meur a gant arke a anavezet, bezant en holl veteier. Ul lod vras zo garvevion anaerat eizhadrigat, dezho un drenkegezh kreñv, un halgarouriezh kreñv, ur wrezgarouriezh kreñv, pe o trigañ en donderioù bras (eienennoù dourwrezel danvor), hogen reoù all a vez kavet er priadoù, en dourioù dous pe e garvevgorzh pervezel an den hag an daskiriered (ma tanzeont alies metan). Ne anavezet ket arke kleñvedus gant an den; neoazh, arke metaneiat 'zo a 'r ganol vezhur a vez gousellet a vezañ en orin ur gorrekadur eus ar c'hir boued ha neuze kiriek da c'houstivadur, tanijern pe bordder.

arciforme

- *la fosse ovale, limitée par un bord arciforme* ar poull vigel'hiek, en dro dezhañ ur ribl gwarennek.

architect-

- *architecture tubuleuse* adeiladur pibellek
- *l'architecture d'un processus néoplasique* adeiladur un argerzh hanweel
- *les caractères architecturaux d'une tumeur* doareoù adeiladel ur yoc'henn
- *substance grise dont on étudie la configuration (architectonie)* par la coloration des noyaux (*cyto-architectonie*) ou des fibres myéliniques (*myélo-architectonie*) steuñvenn louet a studier he c'hefluniadur (adeiladegh) diwar-bouez livañ he c'hraoñelloù (kelligadeiladegh) pe he gwiennoù mielinek (mielinadeiladegh).

aréflexie, aréflexivité, irréflexivité ◇ **areflexia** ◇ **andamoug** g. Ezvezañs an damougoù.

arénation ◇ **arenation** ◇ **kouronk** g. **traezh** Prederiadur ar remm, anezhañ goleñ ar c'horf gant traezh tomm ha sec'h.

aréocèle ◇ **areocèle** ◇ **aezhogad** g. Yoc'henn aezhel ar gouzoug.

aréole ◇ **areola** ◇ **amdioñv** g. Rodenn ruz en dro d'ur poent tanijern.

argentaffine, argyrophile ◇ **argentaffin, argentophil, argyrophil** ◇ **argantlen** aa. A-zivout un elfenn wiad pe gellig livadus gant halioù argant 'zo.

arginine ◇ **arginine** ◇ **arginin** g. Amindrenkenn vazek parzhiat e kor an urebarañ.

argininurie ◇ **argininuria** ◇ **troazhvec'h** g. **arginin, arginindroazhvec'h** g. Bezañs pe feur an arginin en troazh.

argyrie, argyrose ◇ **argyria** ◇ **argiriezh** b., **argiroz** g. Anaer diwar an daspugn en derm eus halioù argant bet diounezet e ser ur mezegadur; azonet gant livrezh louet metalek an amwiskadoù, muiek er parzhioù dizolo.

argyrisme ◇ **silver poisoning** ◇ **argantegezh** b. Teskad an anadennoù pistriel diwar hirarver, yac'hadel pe vicherel, an argant pe an halioù argant.

arithmomanie ◇ **arithmania** ◇ **riñvvar** g. Mac'henn o tougen ar gouziviad da embreger jedadurioù a-zivout kement a ra pe a zo en dro dezhañ.

1 3 arithmomaniac 2 arithmomane ◇ **arithmomaniac** ◇ **1 3 riñvvariat 2 riñvvariad** g. -ed 1 Gant ar riñvvar. 2 Gouziviad ar riñvvar. 3 A-zave d'ar riñvvar.

arm-

- *armature* kebradur
- *armatures d'un condensateur* lavnennoù un dougell
- *instrument dont les mors sont armés d'une denture atraumatique et antidérapante* benveg a zo ouzh e javedoù dent andaraezus ha disrampus.

ARN

- *acide ribonucléique, ARN* trenkenn ribonukleek, RNA
- *ARN complémentaire* RNA klokaat, cRNA
- *ARN messenger, ARNm* RNA kannad, mRNA
- *ARN de transfert, ARNt* RNA treuzdoug, tRNA
- *ARN ribosomique, ARNr* RNA ribozomek, rRNA.

Arneth : formule d'~, image d'~ ◇ **Arneth's index** ◇ **luniad g. Arneth** Rummadur ar granulokit neutrofil hervez derez hoskegezh o c'hraoñell; ent reol e vez gant an darn vuiañ eus ar granulokit neutrofil ur graoñell daou- pe drihoskek; kleizwariet e vez luniad Arneth pa vez muiek ar furmoù nemeurhoskek, dehouwariet pa vez muiek ar furmoù lieshoskek; azon an negez vitamin B₁₂ pe drenkenn folek eo dehouwariadur luniad Arneth.

aromate ◇ **aromatic** ◇ **fronduzenn b.** Danvezenn struzhel c'hwezh vat ganti, sk. : bazilik, jenevra, jinjebr, kanell, koumin, saffron, stragon, turkantin.

aromathérapie ◇ **aromatherapy** ◇ **arouglevgurañ g.** Hentenn yac'haat dre ar strilhadoù eoul struzhel, diounezet dre an hentoù diabarzh pe diavaez, e rezh alkoolat, anverv, douhennad.

aromatique ◇ **aromatic** ◇ **1 frondek aa., arouglevek aa. 2 aromatek aa.** 1 Gant c'hwezh vat kreñv. 2 A-zivout kediadoù kimiek a zo un pe lies korvell benzenek en o molekul.

aromatogramme ◇ ◇ **arouglevbrouad g.** Studi keverata ar gwered o devez ar strilhadoù struzhel war ar bakteri.

arrêt : réaction d'~ ◇ arrest reaction ◇ erwez g. goudaviñ Anadenn empennvarwezadell, anezhi tolc'had ar gorvez alfa (gwagennoù o zalm etre 8 ha 13 dre eilenn, muiek e rannbarzh ar c'hilpenn) da geñver nep amveziaet o tegas an evezh e par ar gwelout : digeriñ an daoulagad, ambredañ ur gounadenn pe un derc'hadenn weledele, strivañ da welout; padal e c'hell hevelep goudaviñ c'hoarvezout ivez da heul kentrigennoù klevedel pe laurel.

arrêt cardiaque ◇ **cardiac arrest, cardiac standstill** ◇ **arsav g. ar galon, spa g. ar galon** Paouez an argrezadoù kalon o tevoudañ arsav an amred ha mannelezh ar gwask talmerel.

arrêt(-)

- *arrêt circulatoire* arsav an amred
- *arrêt de migration du testicule* amzehent ar glidenn, kellamzehent
- *arrêt des règles* span ar mizioù
- *arrêt des hémorragies* herzel ar gwadliñv
- *arrêt du développement organogénétique* paouez an organbarañ
- *arrêt ou déviation de l'organogenèse* darniñ pe wariañ diorreadur an organ, darniñ pe wariañ an organbarañ, ehanbar pe mibar
- *arrêtée préféctoral* diferad a 'r perefed
- *arrêter le saignement* skoilhañ ouzh ar gwadliñv
- *cran d'arrêt* draen harz
- *phase d'arrêt de la croissance du cheveu* lankad paouez e kresk ar blev
- *ralentissement ou arrêt de la circulation* gorregañ pe skoilhañ an amred
- *ralentissement ou arrêt de la propagation de l'activité électrique* gorregañ pe arsavñ treled ar gwerederezh tredan
- *réduction ou arrêt de l'irrigation du cœur* leiañ pe astal eroueriadur ar galon
- *sensation de choc et d'arrêt perçue lors du déplacement transversal de l'arrière-pied* santadur ur stok hag un harz pa laka an imboure'her treñv an troad da riklañ war dreuz.

arrhénoblastome ◇ **arrhenoblastoma** ◇ **arrenoblastom g.** Yoc'henn guñv ar vierez, gourevus, dezhi luniad un adenom a 'r glidenn, o tevoudañ un azoniad gourevegezh hep uswask talmerel na diabet.

ariération affective : syndrome d'~ ◇ ◇ azoniad g. dilerc'hegezh kantaazel Hervez an aozerion ez eo an azoniad-mañ par pe d'an *diazveted kantaazel (immaturité affective)* naous dre vugelegezh ar realezh, an ezhomm bezañ gwarezet, an diouer emrended, pe d'an *negez kantaazel (carence affective, A. & M. Porot)*, pe d'ar *gouvid gouskorel* (R. Spitz, sl. **anaclitique : dépression** ~).

ariération dysmétabolique ◇ ◇ **dilerc'hegezh b. vigennevidel** Dilerc'hegezh vred e dianlen skoilhatur kennevid ur molekul mezhur, o tevoudañ ar yoc'hadur en empenn eus danvezennoù pistriek.

ariération intellectuelle, ariération mentale ◇ **mental retardation, mental backwardness, mental deficiency, psychic retardation** ◇ **dilerc'hegezh kefredel** Skorted diorreadur an arc'hwelioù kefredel, a andaler dre jediñ ar rannad reiz hag a spizer dre an derezioù *skañv, etre, don* pe dre an oad reiz (sl. **âge mental, quotient intellectuel**).

ariération profonde ◇ **idiocy, amentia** ◇ **dilerc'hegezh don** Furm c'hrevusañ an dilerc'hegezh vred pa na sav ket an oad reiz dreist tri bloaz ha pa na zeu ket ar gouziaviad a-benn da gomz.

ariération psychique, retard psychique ◇ **psychic retardation** ◇ **dilerc'hegezh vred** Termen genadel, en e erdal an dilerc'hegezh kefredel hag an dilerc'hegezh kantaazel; dav merkañ ar c'hemmesk o ren e galleg etre an termenou *ariération (pe retard) psychique* hag *ariération mentale (pe retard mental)* hag e saozneg etre *psychic* ha *mental retardation* pa verkont, hervez an aozerion, gwech an *dilerc'hegezh vred*, gwech an *dilerc'hegezh kefredel*.

arrière, arriér-

- *arriéré profond* dilerc'heg don
- *arrière-pied* treñv an troad.

arrondi-

- *érosion arrondie* graspad ront
- *logettes arrondies* loganoù krenn
- *on constate un arrondissement des doigts* e stader e c'hoarvez d'ar bizied krommañ
- *perforations arrondies* boulc'henoù krenn
- *petite saillie arrondie* tosenñ vihan ront
- *plaques d'alopecie circonscrites, arrondies* lec'hiennoù diwaoutad hevonn, arront.

arsénicisme ◇ **arsenicalism** ◇ **arsenikegezh b.** Kontammadur gant kediadoù an arsenik, o naouiñ dreist holl dre strafuilhoù ar benvegad koazhañ er furmoù lemm, hag er furmoù henek dre zarvoudoù nerval ha kroc'henele.

art dentaire ◇ **dentistry** ◇ **dentouriezh b.** Dedalvezadur an anaoudegezhioù gouziel ha kalvezel da vezegeañ an dent, d'o mirout, d'o amsaviñ, da brederiañ o c'hammloadurioù.

art pharmaceutique ◇ **pharmaceutics** ◇ **liaouriezh b.** Dalvezadur an anaoudegezhioù war al liaerezh evit prientiñ liaoù.

artéfact ◇ **artefact, artifact** ◇ **1 daraozad g. 2 darankad g.** 1 Anadenn dec'hanele gant an arsellerezh o taremouezh gant an adenn arsellet hag en araez da falsañ deveizadur houmañ. 2 Er Stlenneg, si e treankañ an arhentou.

artère en collier de perles ◇ **corrugated artery** ◇ **talmerenn b. volbosek** Neuz wagennek speurioù an talmerennoù stadet a-wechoù war an talmerennlunadoù.

artère poplitée piégée ◇ **popliteal artery intrapment** ◇ **tagellad g. talmerenn an arzell** Amwask talmerenn an arzell gant ur skoilh war he zreug pe gant ur gigenn kammenlenet.

artériectasie ◇ **arteriectasis** ◇ **usvoll g. talmerenn, talmerennusvoll g.** Bolc'hadur speurioù un dalmerenn.

artériectomie ◇ **arteriectomy** ◇ **ezvenañ talmerenn, talmerennezvenañ** Dazbidañ ur parzh talmerenn hag ar blezhad simpatek stag outañ.

artériogramme ◇ **arteriogram** ◇ **talmerennlunad g.** Skeudenn graet dre dalmerennluniñ.

artériographie ◇ **arteriography** ◇ **talmerennluniñ** Skinluniñ tiriad un dalmerenn goude ensinklañ enni un danvezenn demer ouzh ar skinoù X.

artériole ◇ **arteriole** ◇ **talmerennig b.** Talmerenn a gavnez bihan.

artériolite nécrosante ◇ **necrotizing arteriolitis** ◇ **talmerennigfo g. marvennus** Anaf o c'hoarvezout da geñver furmoù yud an uswask talmerel, naouus dre vezañs un danvezenn fibrinoidel daspugnet e-barzh krennsae an talmerennigoù hag o kemer lec'h ar c'haberwiennoù distrujet.

artériolithe ◇ **arteriolith** ◇ **talmerennvaen g.** Amsikad razek e-barzh speur un dalmerenn ateromatus.

artériolosclérose ◇ **arteriolosclerosis** ◇ **skleroz g. an talmerennigoù** Anaf o tizhout talmerennigoù diabarzh ar flugez, anezhañ skleroz usventus ar media hag ensaefo henek, oaled ar wazhiedenn o vont d'ur forzh linennek; devoudet e vez alies gant an diabet.

artériopathie ◇ **arteriopathy** ◇ **talmerennad b., naoued g. talmerenn** Anvad rumm klañvadurioù an talmerennoù.

artériorrhaphie ◇ **arteriorrhaphy** ◇ **dlita talmerenn, talmerenn dlita** Krafaelañ speur un dalmerenn.

artérioscléreux ◇ **arteriosclerotic** ◇ **1 arteriosklerozek aa. 2 arteriosklerozeg g. -eion 3 arteriosklerozel** 1 Gant an arterioskleroz. 2 Gouziviad an arterioskleroz. 3 A-zave d'an arterioskleroz.

artériosclérose ◇ **arterioscleroz** ◇ **skleroz g. an talmerennoù, arterioskleroz g.** Termen savet e 1833 evit arouezañ nep tevadur eus speur an talmerennoù; hiziv e tigemmer tri rizh kleñvedoù dic'henezhadel : an • *ateroskleroz*, ar *mediakalkoz* hag an *arterioskleroz* ent strizh, heñañ o c'hoarvezout eus dic'henezhadur hialinel ha tevadur kaherwiennoù ar grennsae hag alies an ensae; tizhout a ra talmerennoù ar c'higennoù hag al lounezhi (sl. *athérosclérose*, *médiacalcosé*).

artériospasme ◇ **arteriospasm** ◇ **andag g. talmerenn, talmerennandag g.** Argrezad speur un dalmerenn.

artériotomie ◇ **arteriotomy** ◇ **enbenañ talmerenn, talmerennenbenañ** Flañchañ speur un dalmerenn war-benn lemel gwad, sankañ ur c'hateter pe diraez ur skoilh ouzh an amred (tromboz pe enfroù).

artérite ◇ **arteritis** ◇ **talmerennfo g.** Anvad rumm anafoù tanijennel pe dic'henezhadel an talmerennoù.

artérite temporale, maladie de Horton, panartérite subaiguë des vieillards ◇ **temporal arteritis, Horton's disease** ◇ **talmerennfo ividig, kleñved Horton** Naoued o c'hoarvezout goude c'hwegont vloaz, naouus dre fallded ar stuz hollek, terzhieni, poan benn kriz muiet en daouividig, tanijenn an talmerennoù ividig, ar re-mañ o vezañ koeñvet, trombozek, laurus ouzh ar stekiñ; dianav eo evit c'hoazh arbenn ar c'hleñved; efedus outañ eo ar c'hortizon; alies e pare dioutañ e unan.

artéri-

- *artériographie carotidienne, vertébrale* talmerennluniñ karotidel, mellkeinel
- *artériopathie oblitérante* talmerennad anforzhus
- *axe artériel* ahel talmerel
- *claquement artériel* stlak talmerel
- *congestion d'origine artérielle* gourwad a-dalmerenn
- *dernières ramifications artériolaires* skoultrennadurioù diwezhañ an talmerennigoù
- *hypertension artérielle* uswask talmerel
- *par voie artérielle rétrograde* dre hent talmerel kilred
- *plasma du sang artériel* plasma a 'r gwad talmerel
- *rameau artériel* barr talmerel
- *vaisseaux artériolocapillaires* korrdalmerennoù.

arthralgie ◇ **arthralgia** ◇ **arzost b.** Laur en arzoù.

arthrifiant ◇ **arthrifluent** ◇ **1 arzloezus aa. 2 arzien aa.** 1 A-zivout un naoued o tevoudañ distruj ar c'henvell. 2 A-zivout un daspugnad lin a zo e orin en ur c'henvell.

arthrite ◇ **arthritis** ◇ **arzfo g.** Anvad rumm anaezioù tanijennel lemm pe henek ar c'henvelloù, naouus ent neuziadurel dre anafoù en irgennoù, da c'houde er migern hag en eskern, ent klinikel dre al laur, ar c'hoañv, a-wechoù gant ruzder ha gwrester ar c'henvell, kevret gant distresadur don pe donoc'h ar stad hollek.

arthrite réactionnelle, rhumatisme post-infectieux ◇ **reactive arthritis** ◇ **arzfo dastaolek, remm g. dianbore** Arzanaez gant fennadoù irus anlestek o tarvezout sizhunvezhioù goude ur pore koazhadel, analadel pe troazhganadel neban, hag o tizhout a-gemparzh an izili; bez' e ve anezhañ un erwezhangaeel ouzh garvevion ar pore.

arthrocentèse ◇ **arthrocentesis** ◇ **arzewanañ** Ezwanañ kavenn ur c'henvell.

arthrocinèse ◇ **joint manipulation** ◇ **arzdefiñval** Kefleuñviñ ar c'henvelloù evit o lakaat da fiñval ent gouzañvat.

arthroclyse ◇ **arzolc'hiñ** Gwalc'hiñ irgenn ur c'henvell.

arthrodèse ◇ **arthrodesis** ◇ **arzklaiviañ** Lemel ent surjaniel loc'husted ur c'henvell dre zevoudañ soutadur an eskern da heul dazbidañ an talbennoù kenvellañ.

- arthrogramme** ◇ **arthrogram** ◇ **arzlunad** g. Skeudenn graet dre arzluniñ.
- arthrographie** ◇ **arthrography** ◇ **arzluniñ** Skinluniñ ur c'henvell goude ensinklañ ennañ un danvezenn demer ouzh ar skinou X pe un aezhenn dishadenn (aer pe oksigen), war-benn imboure'hiñ stumm ar gavenn arz, ar c'hreskennoù, ar stagelloù hag ar stirennoù enarzel, arwelaat ur c'hehent etre an arzkavenn hag ur yalc'h levrus amezek, klask korfoù migornek enarzel diwel dre ar skinluniñ andarbar.
- arthrogryphose multiple congénitale, amyoplasie congénitale** ◇ **amyoplasia congenita** ◇ **kaheriswe** g. **ganedigel** Kleñved hêrezhel naouus dre isteñv ar c'higennoù ha reuted ar c'henvelloù.
- arthrologie** ◇ **arthrologie** ◇ **kenvelloniezh** Rann ar gorfadurezh o plediñ gant ar c'henvelloù.
- arthrolyse** ◇ **arthrolysis** ◇ **arzezglenañ** Adloc'husaat surjanel ur c'henvell tromaotek dre skejañ ar furmadurioù pourc'hadel, stagellel, kaherel a-wechoù hag ar glenelloù etre an talbennoù kenvellañ.
- arthromalacie** ◇ **arthromalacia** ◇ **arzlodad** g. Azoniad hêrezhel naouus dre uslaosk ar stirennoù ha disneuziad korf ar mellennoù ha talpennoù 'zo.
- arthropathie** ◇ **arthropathy** ◇ **arzd** g., **arzanaez** g. Anvad rumm kleñvedoù ar c'henvelloù.
- arthropathie nerveuse** ◇ **neurogenic arthropathy** ◇ **arzanaez nervien** Strafuilhòu teñvel an arzoù dec'hanet gant un nervanaez.
- arthrophyte, corps étranger organique, souris articulaire** ◇ **arthrophyte** ◇ **korf** g. **estren en arz, bulzun** b. **arzel, arzulzun** b. Tamm migorn pe arskorn-migorn diere e-barzh kavenn un arz, en araez da gouboulañ ar c'henvell.
- arthroplastie** ◇ **arthroplasty** ◇ **arzelviñ** Adkempenn surjanel ur c'henvell tromaotek war-benn e adloc'husaat.
- arthropneumographie** ◇ **arthropneumography** ◇ **arzluniñ aezhel** Skinluniñ ur c'henvell bet ensinklet ennañ un aezhenn.
- arthrorise** ◇ **arthrorisis** ◇ **arzkurziñ** Bevennañ ent surjanel fiñvoù ur c'henvell dre ur skurzell askorn pe un ibil.
- arthroscanner** ◇ **arthroscan** ◇ **arzerluniñ** Imboure'hiñ un arz dre skanner.
- arthroscope** ◇ **arthroscope** ◇ **artoskop** g. Ardivink o c'hoarvezout eus ur broskan, ar c'horzan anezhañ hag ur reizhiad optikel a sanker en irgenn bet dardennet gant un dileizhad kengrennek NaCl.
- arthroscopie** ◇ **arthroscopy** ◇ **arzewgeliñ, irewgeliñ** Imboure'hiñ diabarzh kavenn ur c'henvell, an irgenn pergen, diwarbouez un artroskop.
- arthrose, rhumatisme chronique dégénératif** ◇ **arthrosis, osteoarthritis** ◇ **artroz** g., **remm henek dic'henezhadel** Anvad rumm anaezioù dic'henezhadel ar c'henvelloù, naouus ent neuziadurel dre anafoù ha distruj ar migern, diwan amdeñvennoù askorn ha migorn, ent klinikel dre laurioù, strakadoù, disneuziadoù, andrafted, hep tromaot na distresadur ar stad hollek; tizhout a reont ar gliñ, al lez, kenvelloù ar mell kein hag ar bizied.
- arthrostomie** ◇ **arthrostomy** ◇ **arzezforzhañ** Digeriñ surjanel ur c'henvell ha skarvañ an irgenn ouzh ar c'hroc'hen war-benn gwehenniñ endalc'had ar gavenn, oberatadenn a reer war an arzfo linus.
- arthrotomie** ◇ **arthrotomy** ◇ **arzenbenañ** Digeriñ surjanel ur c'henvell.
- articulateur** ◇ **articulator** ◇ **keharzvell** g. **-ioù** Ardivink arveret pa oberier an dentosodoù evit studiañ an doare ma keharz an dent krec'h hag an dent traoñ.
- articulation** ◇ **1 joint, articulation 2 articulation** ◇ **1 arz** aa., **kenvell** g., **koubl** g. **2 kevaotañ** 1 Teskad an elfennoù a ya da unaniñ an eskern kenetrezo. 2 Teskad ar fiñvoù graet gant organoù ar vouezh war red an aer ec'hanalet.
- articulé dentaire** ◇ **dental articulation** ◇ **keharz** g., **keharzadur** g., **keharzvell** g. Doare ma kej ha m'emañ kenempret gorreoù an dent krec'h ha gorreoù an dent traoñ pa vez serret an div aven.
- articul-**
- *capsule articulaire* pourc'had ar c'henvell
 - *cartilage articulaire* migorn kenvell
 - *cavité articulée avec un condyle* kavenn kenvellet gant ur skodenn
 - *cellule présentant de longues expansions cytoplasmiques qui s'articulent avec celles des cellules voisines* kellig outi azledadoù hir kitoplasm kenvellet gant re ar c'helligoù amezek
 - *rhumatisme articulaire aigu* remm lemm an arzoù
 - *surfaces articulaires* talbennoù kenvellañ.
- artificiel(-)**
- *alimentation artificielle* boueta kalvezadel
 - *antigènes artificiellement fixés* antigenoù lenet ent kalvezadel
 - *cavité artificielle* kavenn galvezadel
 - *rayonnements solaires ou artificiels* skinadoù heolel pe galvezadel
 - *subdivisé un peu artificiellement* isrannet danzeadel a-walc'h
 - *ventilation artificielle* gwenterezh kalvezadel.
- aryténoïdite** ◇ **arytenoiditis** ◇ **picheregfo** g. Tanijenn en dro d'ar pichereg stadet da geñver torzhellegezh ar c'harloc'henn.
- aryténoïdopexie** ◇ **arytenoidopexy** ◇ **Aanlenañ pichereg, picheregAanlenañ** AAanlenañ surjanel ar pichereg er-maez eus e loadur war-benn frankaat an tarzsh.
- arythmie** ◇ **arrhythmia** ◇ **migorvez** g. Strafuilh e reoliegezh korvez ar galon.
- arythmie complète** ◇ **continuous arrhythmia, perpetual arrhythmia** ◇ **ankorvez** g. Steuz nep korvez en argrezadoù ar galon, naouus dre dizingalded heled hag entremezioù al lammoù ha peurliesañ an ustead; dec'hanet e vez peurliesañ gant ar c'hrehad kentez; bez' e c'hell bezañ grezvarrek pe drebadek.

- arythmie extrasystolique** ◇ **extrasystolic arrhythmia** ◇ **migorvez dreistsistolek** Migorvez diwar dreistsistolou o taremouezh gant ur gorvez reol.
- arythmie respiratoire** ◇ **respiratory arrhythmia** ◇ **migorvez analadel, mideal g. analadel** Strafuilh e talm ar galon o c'hoarvezout a herrekaat e-doug an enanañ, a c'horrekaat e-doug an ec'hanañ.
- arythmie sinusale** ◇ **sinusal arrhythmia** ◇ **migorvez godel** Direoliegezh korvez ar galon diwar ur strafuilh e talm ar broudedoù digant ar god; direoliegezh ar skogoù godel o tevoudañ hini ar galon en he fezh.
- arythmique** ◇ **arrhythmic** ◇ **1 migorvezek aa. 2 migorvezel aa.** 1 Gant ar migorvez. 2 A-zave d'ar migorvez.
- arythmogène** ◇ **arrhythmogenic** ◇ **migorveseiad aa.** O tec'han migorvez.
- asbestose** ◇ **asbestosis** ◇ **asbestoz g.** Analeuflegezh veinel fibroseiad grevus, a stroll ar silikatozioù, devoudet gant an enanaladur a-bad pe a-vloc'h eus edañvoù asbest; emañ war roll ar c'hleñvedoù micher.
- aschématie** ◇ ◇ **1 mic'houlun g. 2 disgoulun g.** 1 Anvad rumm strafuilh e goulun an emgorf. 2 Strafuilh e goulun an emgorf a laka lodennoù 'zo anezhañ da steuziañ (sl. *asomatognosie*).
- ascite** ◇ **ascites** ◇ **torliñv g.** Fennadur liñvel en ampeleñ; torliñvenn a reer eus dourenn an torliñv.
- ascitique** ◇ **ascitic** ◇ **1 2 torliñvek aa. 3 torliñvel aa.** 1 Gant an torliñv. 2 A natur an torliñv. 3 A-zave d'an torliñv.
- ascorbique** : **acide** ~, **vitamine C, acide hexuronique** ◇ **ascorbic acid** ◇ **trenkenn b. askorbek, vitamin g. C, trenkenn heksuronek** Parenn oksidañ-diren pouezus er bevedeg; perzhiañ a ra er c'hennevidoù pennañ (glukoz, amindrenkennoù, houarn), en enaoz hormonnoù 'zo, e harzusted speur ar gwazhied, e mezhur ar gwriad kenglenel; bezant el legumaj fresk hag en agrum; an negez anezhi a zec'han ar skorbut.
- asémie** ◇ **asemia** ◇ **anec'heul g.** Steuz an eztaoliñ meidel a stader gant ar velankoleion, an dilerc'heion, an envedion; azon bredel da ziforc'h diouzh an *anveid*, azon nerval, ha diouzh ar *mianneul*, anvad rumm an direizhoù, nerval ivez, eus ar savelañ eul (sl. *amimie, asymbolie*).
- asepsie** ◇ **asepsis** ◇ **1 anlest g. 2 anlestañ, anlesterezh g.** 1 Stad m'emañ un dafar, ur metoù goude lamet dioutañ pep garvev. 2 Hentenn da ziraez an anlest war-benn herzel ouzh ar garvevion lestus pe boreüs a zont tre er bevedeg; diforc'h diouzh an dilestañ dre ma ne ra ket gant liaoù.
- aseptique** ◇ **aseptic** ◇ **1 anlestek aa. 2 anlestel aa. 3 anlestadel aa., anlesterezhel aa.** 1 Er stad anlest. 2 A-zave d'an anlest. 3 A-zave d'an anlestañ, d'an anlesterezh.
- asexué** ◇ **asexual** ◇ **1 anrev aa., anrev g. 2 anrev g. -ed, anrev g. -eion 3 anrev aa.** 1 Hep rev. 2 Hinienn hep rev. 3 Hep araez ar revelezh, a-zivout ar gouennañ.
- asialie** ◇ **asialia** ◇ **anhav g.** Ezvezañ an halv, pe diwar anvorc'h, pe diwar azdalc'h (sl. *aptyalisme*).
- asomatognosie, somato-agnosie** ◇ **somatagnosia** ◇ **korfadenaoud g.** Strafuilh e goulun an emgorf, anezhañ an andenaoud eus ul lodenn, peurliesañ an hanterenn anezhañ (*ledkorfandenaoud*) a-geñver gant ul ledseizi (sl. *aschématie, hémiomatognosie*).
- aspect**
- *aspect de vésicule fraise* neuz ar gellenn sivi
 - *aspect lactescent* neuz laezhek
 - *aspect macroscopique* neuz veurselladel
 - *aspect morphologique* arvez neuziadurel
 - *aspect radiographique* neuz skinlun
 - *d'aspect normal* a neuz reol
 - *d'aspect variable* a neuz argemmus, liesneuz
 - *en fonction de l'aspect de la muqueuse pharyngée* hervez neuz glaourgenn ar c'hargadenn
 - *il se présente classiquement sous l'aspect d'une érosion indurée* e neuz klasel eo ur graspad argalet
 - *l'aspect que prennent les lymphocytes* an neuz gwisket gant al limfokit
 - *un aspect de bloc de branche* un arvez tolc'had barr.
- aspermatisme** ◇ **aspermatisem** ◇ **speranderod g., anderod g.** Divarregezh da zerodiñ sper.
- aspermie** ◇ **aspermia** ◇ **speranvorc'h g.** Ezvezañ ar borc'hañ sper.
- asphygmie** ◇ **asphygmia** ◇ **anpoulz g.** Ezvezañ ar poulz.
- asphyxie** ◇ **asphyxia, asphyxiation** ◇ **1 angwent g., moug g. 2 angwentañ, mougañ** 1 Leiadur pe arsav an analañ devoudet gant ur skoilh fizikel (sozadur, tagadur, gwaskadur ar brusk, isvoll ar c'harloc'henn, diouer oksigen enanalet) o tevoudañ an isvec'h oksigen hag an usvec'h dioksidenn garbon; astennet eo bet an termen d'an holl zegouezhioù ma vez skoilhet an hematoz. 2 Devoudañ an angwent, ar moug.
- asphyxie des extrémités, acro-asphyxie** ◇ **acroasphyxia** ◇ **moug ar bleñchoù** Strafuilh gwazhiedloc'hadel an eizhaennoù, azon kleñved Raynaud, naouus dre an dulaz hag an aneraez laurek.
- asphyxie des nouveaux-nés** ◇ **asphyxia neonatorum** ◇ **moug an nevezc'hanidi** Isvec'h oksigen e gwad ar grouell devoudet gant amwask ar funig pe gant an isvec'h oksigen e gwad ar vamm.
- asphyxier** ◇ **to asphyxiate** ◇ **angwentañ, mougañ** Devoudañ an angwent, ar moug.
- asphyxique** ◇ **asphyxic** ◇ **1 angwentek aa. 2 angwentel aa.** 1 Gant an angwent. 2 A-zave d'an angwent.
- aspirine, acide acétyl-salicylique** ◇ **aspirin** ◇ **aspirin g., trenkenn b. aketilsalikilek** Heuder ar c'hiklooksigenaz, arveret evel lia enepfo, enepetzienn, dic'hoster, enepdazus pladanoù, enepromboz.

aspirin-like syndrome ◇ **aspirin-like syndrome** ◇ **azoniad g. aspirinvanek** Pladanaez hêrezhel heñvel e erzerc'hadur enta ouzh miwaredoù an aspirin : naouus ent vevoniel dre an divig kiklooksigenaz, ent klinikel dre ar gwadliñvoù.

aspir-

• *biopsie par aspiration de sécrétions physiologiques ou pathologiques* bevsav dre suc'hañ borc'hadoù bonan pe gleñvedel.

asplénie ◇ **asplenia** ◇ **anfelc'h g.** Ezvezañs c'hanedigel ar felc'h.

assimilation ◇ **assimilation** ◇ **bevelaat** Arvez eus ar mezhur, anezhañ treuzfurmiñ ar bouedoù euvret e danvez ar bevedeg ; c'hoarvezout a ra a anadennoù enaozañ diwar-bouez enzimoù.

assistance circulatoire, assistance cardiocirculatoire ◇ **circulatory assistance** ◇ **amredeilañ, amredeilerezh g.** Kalvezder amkanet da barraat ouzh skorted lemm ar galon dre adsavelañ erfenn ar gwad en amred trogorfat ha kurunerel ; mar chom ar merata kalon mod eeunañ an amredeilañ, e vez kaset hemañ da benn er salioù oberata diwar-bouez argerzhioù kemplezh ouzh kemplezh (sl. *aortomyoplastie*).

assistant social ◇ **social worker** ◇ **skorour g. kevredik, kedwezhour g.** Gwezhour kefridiet gant un aozadur foran pe brevez da ziurnat ar parennoù nozus da gempouez kreud, bred pe gevredadel an hiniennoù, an tiegezhioù, ar strolleñnoù ha da studiañ an hentoù da barraat outo.

assistant des facultés, assistant hospitalier ◇ ◇ **skoriad g. -ed ar skolioù meur, skoliad an ospitalioù** Ezel eus ar c'hoskor ospitalel-skolveurel kefridiet da geñenn ar skiantoù diazez d'ar studierion, da ren imbourc'hioù er rannoù ospital.

assistant : attaché-~ ◇ ◇ **prezour g. -ion skoriad** Ezskoriad a 'n ospitalioù karget hepken da eilañ ar penn rann pe da lakaat en arver kalvezderioù imbourc'hioù ha mezegañ na vezont ket embreget boas gant izili ar c'hoskor mezegel.

assist-

• *assistance médico-sociale* skorañ mezegel-kevredik • *personne assistée* den gwaredet.

association ◇ **medical partnership** ◇ **1 kevelerezh g. mezeion 2 keveleriezh b.** 1 Embreg ar vezekniezh gant daou pe lies hollegour pe arbennigour a un diskiblezh liammet dre gevrat. 2 Staelad ar vezeion geveler.

association microbienne ◇ **mixed infection** ◇ **kevredadur g. garvevion** Kenwered lies spesad garvevion o kas un arc'hwel bevedel dibarek (goiñ, breinañ, poreañ).

associé ◇ ◇ **keveler aa. & g. -ion** Pep hini eus ar vezeion oc'h embreger e keveleriezh.

assoc-

• *association d'orthèses fémoro-jambières à un corset* kenstroll div amsteudell vorzhed-gar gant ur gorfken • *association d'une aménorrhée et d'une galactorrhée* kevredet ur mizanliñv hag ul laezhver • *association d'une angiocholite et d'une cholestyite* kevredet un angiokolit hag ur c'holekistit • *association d'une syphilis au chancre mou* kevredet ur sifiliz gant al livant meizh • *association de plusieurs muscles* kenwered lies kigen • *dysostose associant un retard statural et un retard mental* mideñv an eskern kevret gantañ ur goulerc'h korfadur hag ur goulerc'h bred • *mouvements associés des yeux* kenfiñvoù an daoulagad • *pneumocotiose résultant de l'association d'une anthracose et d'une silicose* analeuflegezh o c'hoarvezout eus un antrakoz kevret gant ur silikoz • *syndrome associant un myosis et un rétrécissement de la fente palpébrale* azoniad, ouzh e ober, kevret, ur mabisvöll ha strishadur faout ar malvennoù • *syndrome associant une malabsorption intestinale et une infiltration plasmocytaire diffuse du chorion de l'intestin grêle* azoniad o kevredañ ur misug pervez hag un amfuad strewek plasmokit e-barzh tonenn ar vouzellenn voan.

assourdissement ◇ **attenuation of the audition** ◇ **disklevedañ** Araezad arveret er c'hlevandalañ evit lemel ar perzh kemeret er c'hleved gant ar skouarn na arseller ket ha studiañ eben rikoc'h, anezhañ arloañ ouzh ar skouarn a venner eperzhiañ ur c'hentrigad klevedel oc'h astaliñ pep merzhout enni.

1 assuétude, accoutumance 2 assuétude, dépendance, addiction ◇ **1 habitude, acquired tolerance 2 addiction** ◇ **1 arsoc'h g., tozelladur g. 2 estoue g.** 1 Gougemerusted arzeuat ar bevedeg ouzh parennoù strafuilhus. 2 Youl andistrec'h da gemer dram a zoenoù argreskus (sl. *accoutumance, chimiodépendance, dépendance, pharmacodépendance, toxico-manie*).

astatie ◇ **astasia** ◇ **ansav g.** Koll ar galloud da chom war sav ; kevret e vez hogos bepred gant an ankerzh.

astatie-abasie ◇ **astasia-abasia** ◇ **ansav-ankerzh g.** Strafuilh an diasav hag ar c'herzhed digevret diouzh nep direizh en nerzh kaerel pe e gwikefreoù ar c'herzhed, a-geñver gant an darfell peurliesañ.

astatie avec rétropulsion ◇ ◇ **ansav gant drekkorzhañ** Kouezh war gil hep dastaol kempouezañ pe fiñv an izili traoñ.

astabasophobia ◇ **astabasophobia** ◇ **arur g. an ansav-ankerzh** Aon da gouezhañ o devez pa vezont en o sav pe war vale ar glañvourion dalc'het gant strafuilhoù ar c'hempouez.

astérognosie, stéréo-agnosie, agnosie tactile ◇ **astereognosis, stereoagnosia** ◇ **andenaoud g. stekiñ, stokandenaoud g.** Koll ar galloud da hennadiñ an traezoù dre ar stekiñ (sl. *ahylognosie, amorphognosie*).

astérognosique, stéréo-agnosique ◇ **astereognosic, stereoagnosic** ◇ **1 stokandenaoudek 2 stokandenaoudeg g. -eion 3 stokandenaoudel aa.** 1 Gant an andenaoud stekiñ. 2 Gouziviad an andenaoud stekiñ. A-zave d'an andenaoud stekiñ.

astérix ◇ **asterixis, flapping tremor** ◇ **dispafalad g., asteriksiz g.** Stroñsadoù direoliek ar c'higennoù diwar spanaennoù trumm ha berr eus an tant, azon d'an empennaoued avuien, da skorted an analañ pe al louezhi, d'ar gwadisevec'h kaliom.

- asthénie** ◇ **asthenia** ◇ **asikted b.** Gwanidigezh hollek vras hep keñver gant an dispign gremm, anglevad fillidigezh en ezvezañs eus ar strivoù (sl. *myasthénie, psychasthénie*).
- asthénique** ◇ **asthenic** ◇ **1 asik aa., asikeg aa., asiket aao. 2 asikeg g. -eion 3 asikel aa.** 1 Gant an asikted. 2 Neb a zo gant an asikted. 3 A-zave d'an asikted, sk. : *furm asikel ur c'hleñved*, eleze gant an asikted e-touez anazonoù anezhañ.
- asthénopie** ◇ **asthenopia** ◇ **lagadasikted b.** Skuizhadusted al lagad; termen arveret dreist holl a-zivout arc'hwelioù an argeidañ hag ar c'hengerc'hañ.
- asthénospermie, asthénozoospermie** ◇ **asthenospermia** ◇ **sperasikted b.** Istead hag ispad fiñval ar spergelligoù.
- asthmatforme** ◇ **asthmatform** ◇ **astmaheñvel aa., astmavaneq aa.** A-zivout erzerc'hadoù analañ heñvel ouzh re an astma.
- asthmatique** ◇ **asthmatic** ◇ **1 astmatek aa. 2 astmateg g. -eion 3 astmatek aa.** 1 Gant an astma. 2 Gouziviad an astma 3 a-zave d'an astma.
- asthme** ◇ **asthma** ◇ **astma g.** Kleñved dezhañ da erzerc'had pennañ barradoù trec'hwezh diwar andag, darwazh hag usvorc'h ar bronkez; naouus eo dre uskizidigezh ar forzhioù analañ hag an erwezhiusted allergek ouzh kentrigoù diseurt; kevaraez et vez gant parennoù niverus : an digempouez nervenborc'hadel, ar poreadoù, ar stroñsoù fromel, h.a.
- asthme à dyspnée continue, asthme chronique** ◇ **chronic asthma** ◇ **astma trec'hwezh diastal, astma henek** Astma a-gozh hep mui a entremezioù analañ reol dedroet trema ar skorted wentadur steviadel padek.
- asthme à dyspnée paroxystique** ◇ **spasmodic asthma** ◇ **astma grezvarrek** Astma naouus dre varradoù istead ec'hanañ a aliested kemmus, reol an analañ etrezo.
- asthme cardiaque** ◇ **cardiac asthma** ◇ **astmavan g. kalonien** Trec'hwezh grezvarrek diwar gouliñv ar bronkez devoudet gant skorted dehou ar galon.
- asthme : attaque d'~** ◇ **kaouad b. astma** Lerc'hiad barradoù astma kreñv ha padus, etrezo entremezioù berr; pa steuz ar re-mañ e tarvez an aroad astma, rouestlad grevus a c'hell dec'han falladur dehou ar galon (sl. *état de mal asthmatique*).
- astigmat** ◇ **astigmatic** ◇ **1 amstiwelk aa. 2 amstiwelg g. -ion** 1 Gant an amstiwel. 2 Gouziviad an amstiwel.
- astigmatique** ◇ **astigmatic** ◇ **amstiwelk aa.** A-zave d'an amstiwel.
- astigmatisme** ◇ **astigmatism** ◇ **1 amstiegezh b. 2 amstiwel g.** 1 Doare ur reizhiad optikel n'eus enni luc'hahel kelc'hreñ ebet, eleze ma n'o deus ket gorreoù an dioproù furm ur gokenn bellenn. 2 Si gouskogañ a ra d'al lagad reiñ eus un dra skeudennoù disheñvel hervez an ahelioù.
- astragalectomie** ◇ **astragalectomy** ◇ **ferezvenañ** Digewanañ an askorn fer; dibad e vez ar ferezvenañ pa adlec'hier an askorn goude e adstummañ (prederiadur surjiañel an troad potin).
- astrigent** ◇ **astrigent** ◇ **1 krezus aa. 2 krezuzenn b.** 1 O startaat ar gwianoù er c'helligoù ha, diouzh an dro, o leiaat ar borc'hañ en ur gouli pe er pervez (enepdarc'hoal). 2 Lia krezus.
- astrocytes** ◇ **astrocytes** ◇ **astrokit s.** Kelligoù steredennek lodek er makroglia, oc'h amparañ ar reizhiad harpañ, gwareziñ ha magañ an nervwiad (sl. *macroglie, microglie, névroglie*).
- astrocytome** ◇ **astrocytoma** ◇ **astrokitom g.** Seurtad gliom kuñv an nervahel evodet diwar an astrokit.
- astroglie** ◇ **astroglia** ◇ **astroglia g.** Gwiad o c'hoarvezout eus astrokit.
- asymbole** ◇ **asymbolia** ◇ **mianneul g.** Anvad rumm direizhoù an arc'hwelioù empenn o perzhiañ er savelañ eul (anneulañ), eleze an ankonz, an andenaoud, an andigon.
- asymptomatique** ◇ **asymptomatic** ◇ **diazon aa.** O chom enkelat, hep azon klinikel.
- asynclitisme** ◇ **asynclitism** ◇ **amstou g.** Kosteziadur eus penn ar grouell d'an ampoent ma sank en digor krec'h, o reiñ da vosoù ar gitem an tu da dremen an eil war lerc'h egile.
- asynergie** ◇ **asynergia** ◇ **ankedal g.** Digenurz etre argrezadennoù ar stolloù kigennoù a gemer perzh en ur jestr.
- asynergique** ◇ **asynergia** ◇ **1 ankedalek aa. 2 ankedalel aa.** 1 Gant an ankedal. 2 A-zave d'an ankedal.
- asystole** ◇ **asystole** ◇ **asistol g.** Paouez argrezañ kentez ha/pe kofig ar galon.
- ataractique** ◇ **ataractic** ◇ **1 hezoniek aa. 2 hezonius aa. 3 hezoniel aa.** 1 Gant an hezoni. 2 O tec'han an hezoni. 3 A-zave d'an hezoni.
- ataraxie** ◇ **ataraxia** ◇ **hezoni b.** Habaskted askre; *hezoni goazhadel* a reer eus arc'hwelerezh distrafiuilh ar benvegad koazhañ.
- atavisme** ◇ **atavism** ◇ **urvegezh b.** Trebad an doareennoù hêrezhel a-dreuz d'ar remziadoù.
- ataxie** ◇ **ataxia** ◇ **ankedre g.** Digenurz er fiñval diarvenn hep keñver gant un divig loc'hadel, devoudet peurliesañ gant strafuillh an doneraeziñ pe gant tizhadoù an ilpenn (*ankedre ilpennel*).
- ataxie aiguë, maladie de Leyden** ◇ **acute ataxia, Leyden's ataxia** ◇ **ankedre lemm, kleñved Leyden** Tanijenn strewek eus an nerveg, daazonoù dezhi an ankedre, an usdamoug, gouseizi kigennoù 'zo, andagoù (nistagmuz, gougrid an troad), tuzumadur ar meiz; tizhout a ra ar re yaouank ha pareañ alies.

ataxie calleuse ◇ ◇ **ankedre karnegel** Kevreted un ankedre hag andagoù diwar ur yoc'henn er c'horf karnek.

ataxie optique ◇ **optical ataxia** ◇ **ankedre gweledel** Digenurzh o lakaat diaes ren fiñvoù azas dindan reolerezh ar gweled hepken.

ataxie-télangiectasies, syndrome de Louis Bar ◇ **Louis Bar's syndrome** ◇ **ankedre-korrwazhiedusvoll, azoniad g. Louis Bar** Anaez hêrezhel o c'hoarvezout eus un azoniad nervel (ankedre ilpennel, azoniad ampikernennek, fiñvoù koreatetozek, direizhoù fiñval an daoulagad), kevret gant usvolloù korrwazhied er gevresae pergen, strafuilhoù diorreadur ar gwagrennoù genel, poreadoù ar forzhioù analañ, marvus alies.

ataxique ◇ **ataxic** ◇ **1 ankedreek aa. 2 ankedreeg g. -eion 3 ankedreel aa.** 1 Gant an ankedre. 2 Gouziviad an ankedre. 3 A-zave d'an ankedre.

ataxoparaplégie ◇ **ataxic paraplegia** ◇ **daouseizi-ankedre g.** Kevreted an digenurzh hag ar seizi devoudet gant anafoù diaser e pañsoù kostezel hag e pañsoù adrefiv ar mel.

atélectasie ◇ **atelectasis** ◇ **isvoll g. logigoù, logigisvoll g.** Anaf skevent, anezhañ flakadur al logigoù ha frankadur ar c'horrwazhied, alies diwar steviadur ar bronkez; er grouell ez eo reol al logigisvoll.

atélocéphalie ◇ **atelencephalia** ◇ **anhelouer g. empenn, empennanhelouer g.** Kammneuziad an empenn dre baouez an diorreadur anezhañ.

atéliose, atélieose ◇ **ateliosis** ◇ **oadouraniezh b.** Strafuilh an diorreadur bloc'hel naouus dre zevoud ma chom ment ur bugel gant an oadour, hep direizhoù kreud na bred peurliesañ.

atéliose asexuée ◇ ◇ **oadouraniezh anrevek** Oadouraniezh ma chom anhelouer an organoù revel, a seller evel ur furm eus ar vugelvanegezh (sl. *infantillisme*).

atélosique ◇ **ateliotic** ◇ **1 oadouran aa. 2 oadouran g. -ed** 1 Gant an oadouraniezh. 2 Gouziviad an oadouraniezh.

atéloprosopie ◇ **ateleprosopia** ◇ **anhelouer dremm, dremmanhelouer g.** Kammneuziad an dremm dre baouez an diorreadur anezhi.

athalamie des aphaques ◇ ◇ **ankambr g. an anferenaeion** Flakadur kambr arak ar voull lagad goude oberatadenn ar ferennlug.

athélie ◇ **athelia** ◇ **bronnaveg g.** Ezvezañs c'handedigal ar beg bronn.

athérectomie, athéromectomie ◇ **atherectomy** ◇ **ateromezvenañ** Dilemel pe distrujañ ar plakennoù aterom en talmerennoù dre un araezad treloc'hel pe dre laser.

athérogène ◇ **atherogenous** ◇ **aterombar aa.** O tec'han an aterom.

athérogenèse ◇ **atherogenesis** ◇ **aterombarañ** Dec'han aterom.

athéromatose ◇ **atheromatosis** ◇ **ateromatoz g.** Anaez naouus dre vezañs an aterom en talmerennoù.

athérome ◇ **atheroma** ◇ **aterom g.** Anaf henek anezhañ an diwan eus plakennoù kolesterol ebarzh ensae an talmerennoù o tevoudañ ar skleroz hag ar razekadur anezhi.

athérosclérose ◇ **atherosclerosis** ◇ **ateroskleroz g.** Stad an talmerennoù a zo o ensae karget gant an aterom, alese sklerozet, razezaet hag a-wechoù anforzhekaet; tizhet e vez dreist holl an talmerennoù bras ha krenn (aortenn, talmerennoù an izili hag an empenn, kurunerennoù).

athétoïde ◇ **athetoid** ◇ **atetozvanek aa., atetoidel aa.** A-zivout fiñvoù heñvel ouzh re an atetoz.

athétose ◇ **athetosis** ◇ **atetoz g.** Azoniad a-geñver gant anafoù ar reizhiad ampikernennek, naouus dre fiñvoù andiarvenn, emdarzh, digenurzh, gorrek hag ampl a 'n eizhaennoù hag a 'r fas, kevret gant strafuilhoù a 'n tant (istant goueled, ustant spanennek).

athétosique ◇ **athetotic** ◇ **1 3 atetozek aa. 2 atetozeg g. -eion** 1 Gant an atetoz. 2 Gouziviad an atetoz. 3 A-zave d'an atetoz.

athrepsie ◇ **athrepsia** ◇ **atrepsiezh b.** Treuted eizhañ gant ar vabaned disvezhurek.

athymhormie ◇ ◇ **ankantoug g.** Steuz ar c'hantoug, eleze an tennder boniek o c'houstennañ an noa, naouus dre an andeur hag an ankantaez, sellet evel un azon a skizofreniezh.

athymie ◇ **athymia** ◇ **1 antoazon g. 2 aneroug g.** 1 Ezvezañs c'handedigal an toazon. 2 Steuz a 'n erougañ, eleze fillidigezh a 'n noa e kement ma 'z eo hemañ lusk an den etrezek an dud all ha m'en doug d'an niñvañ, naouus dre an digasted kantaet hag an anober, stadet en anaezioù evel ar gouvid, ar malouen, an envedi.

athyroéose, athyroïdie ◇ **athyrosis, athyroidism** ◇ **1 anskoed g. 2 skoedanvorc'h g.** 1 Ezvezañs, ganedigal pe surjijanel, ar skoedenn. 2 Ezvezañs vorc'hañ ar wagrenn skoed.

atonie ◇ **atonia** ◇ **antant g.** Koll tennder ar gwiad kaheer.

atone

- *plaié atone* gouli diek.

atopie ◇ **atopy** ◇ **atopiezh** b. Araezusted ezreol da enaozañ immunoglobulinoù spesadel (IgE) ouzh allergenoù nebantek (uloc'h, pollen, blev loened) en orin erzerc'hadoù klinikel evel sifern ar foenn, an astma, al linadell, an ekzema genezhel, an allergiezhoù bouedel.

atopique ◇ **atopic** ◇ **atopek** aa. A-zave d'an atopiezh.

atopognosie ◇ **atopognosia** ◇ **andenaoud** g. **lec'hiou an emgorf, emlec'handenaoud** g. Koll ar galloud da zelec'hiañ an eraezadoù stekiñ (sl. *autotopo-agnosie*).

atrésie, imperforation ◇ **atresia** ◇ **anvoll** g. Andigor hollel pe danel, ganedigel pe arzeuat eus un toull naturel pe eus oaled un organ.

atrésie du vagin, colpitrésie ◇ **anvoll ar gouin, gouinanvoll** g. Andigor ar gouin.

atrésie orificielle pulmonaire ◇ **pulmonary valve atresia** ◇ **anvoll gwask ar c'hef a-skevent** Andigor gwask ar c'hef a-skevent, an teir sac'hell, kempeget, o vont d'ober ur stiv stirek.

atrésie tricuspidiene ◇ **tricuspid valve atresia** ◇ **anvoll an trapig tribroudek, anvoll tribroudek** Kammneuziad o c'hoarvezout eus kempegad sac'helloù an trapig tribroudek kevret gant ur c'hentad etre-kentezoù.

atrial, auriculaire ◇ **atrial** ◇ **kentezel** aa. A-zave da unan pe d'an daou gentez.

atrichie ◇ **atrichia** ◇ **anvlev** g. Ezvezañs, ganedigel peurliesañ, eus an holl vlev.

atriogramme, auriculogramme ◇ **kentezvarwezad** g., **kentezewad** g. Lodenn eus ar c'halonvarwezad a-geñver gant gweredrezh ar c'hentez.

atriomégalie ◇ **atriomegaly** ◇ **kentezusvent** g., **kentezusvoll** g. Kresk ezreol eus ec'honad ur c'hentez, bolc'hadur ur c'hentez.

atrioseptopexie ◇ **atrioseptopexy** ◇ **Aanlenañ kentez-tilhenn** Prederiadur surjaniel goustegus gwezhiet war ar vagadell ouzh kammloadur ar gwazhied bras.

atriotomie ◇ **atriotomy** ◇ **kentezenbenañ** Skejañ speur ar c'hentez war-benn diraez kavennoù ar galon.

atrioverteur ◇ **atrial defibrillator** ◇ **diskrehader** g. **-ioù kentez, atriortor** g. **-ioù** Ardivink ensteudadus da lakaat paouez ar c'halongrehad.

atri-

• *jonction atrioventriculaire* kevre kentez-kofig • *région atrionodale* rannbarzh kentez-klom • *tachycardie atriale* kalonustead kentezel, kentezustead.

atrophie ◇ **atrophy** ◇ **1 isteñv** g. **2 isvent** g. 1 Isvent a orin mezhurel. 2 Leiâd ec'honenn a ne vern pe orin; damheñvelster eo an daou dermen, nemet ez eo hollekoc'h *isvent* hag arveret e vez *isteñv* pa zaveer da ardarzh mezhurel an isvent.

atrophie cérébrale ◇ **cerebral atrophy** ◇ **isteñv an empenn, empennisteñv** g. Anvad rumm holl gleñvedoù dic'henezhadel strewek pe hevonn o tizhout neuron ar bluskenn empenn; ne renker ket e-touez an empennisteñvoù an isventoù diangorzh diouzh un argerzh dic'henezhañ.

atrophie cérébelleuse ◇ **cerebellar atrophy** ◇ **isteñv an ilpenn, ilpennisteñv** g. Anvad rumm holl gleñvedoù dic'henezhadel an ilpenn ha pa dizhfent ar bluskenn, ar gwiskadoù danloet pe an hordennoù enankat pe ec'hankat; ur furm eo *isteñv ilpenn an alkooleion* a zo un isteñv a'r bluskenn.

atrophie corticale associée ◇ ◇ **pluskennisteñv kevret** Dic'henezhad eus ar bluskenn empenn ha, war un dro, eus parzhioù all a'n nervahel (kleñved Creutzfeldt-Jakob, korea Huntington, kleñved Charcot).

atrophie corticale isolée ◇ ◇ **pluskennisteñv digevret** Naoued dic'henezhadel ar bluskenn empenn hep diraez parzhioù all an nervahel (kleñved Pick, kleñved Alzheimer).

atrophie cutanée, dermatrophie ◇ **atrophoderma** ◇ **isteñv ar c'hroc'hen, kroc'henisteñv** g. Anvad rumm an naouedoù dic'henezhadel, ganedigel pe eilvedel, oc'h erzerc'hañ dre danavadur ar c'hroc'hen, dre goll ar c'hantalc'h hag an dastennegezh anezhañ (isteñv gwenn Milian, isteñv kolloidel, isteñv diwar gortikoidoù, isteñv kozhiadel, isteñv an ivinoù, isteñv ar c'hourzh).

atrophie olivo-ponto-cérébelleuse ◇ **olivopontocerebellar atrophy** ◇ **isteñv olivenn-pont-ilpenn** Naoued dic'henezhadel o tizhout gronnoù ha hordennoù ar pont hag an ognonenn.

atrophodermie vermiculée des joues, acné vermoulante ◇ **atrophoderma vermiculata** ◇ **kroc'henisteñv preñvedik, akne** b. **breñvedik** Dermatoz ar vugale naous dre ur c'heratoz bolc'hennel hag un isteñv eus kroc'hen an divvoc'h o reiñ dezho un neuz preñvedik.

atrophique ◇ **atrophic** ◇ **1 1 isteñvek** aa. **1 2 isteñvel** aa. **1 3 isteñvus** aa. **2 1 isventek** aa. **2 2 isventel** aa. **2 3 isventus** aa. 1 1 Gant an isteñv. 1 2 A-zave d'an isteñv. 1 3 O tec'han an isteñv. 2 1 Gant an isvent. 2 2 A-zave d'an isvent. 2 3 O tec'han an isvent.

atroph-

• *atrophie blanche de Milian* isteñv gwenn Milian • *atrophie cicatricielle* isteñv kleizennel • *atrophie colloïdale* isteñv kolloidel • *atrophie cortisonique* isteñv diwar gortikoidoù • *atrophie optique* isteñv an nervennoù gweled, isteñv gweledel • *atrophie sénile* isteñv kozhiadel • *atrophie thénarienne* isteñv ar c'hourbozenn • *atrophie utéro-ovarienne* isteñv krozh-vierez • *atrophie vulvaire*

isteñv ar c'hourzh • *béribéri atrophique* beriberi isteñvus • *cirrhose atrophique* kirroz isteñvus • *diabète lipo-atrophique* diabet behinisteñvus.

atropine ◇ **atropine** ◇ **atropin** g. Alkaloid eus Solaneged 'zo, ar benede (*Atropa belladonna*) pergen, tolc'her parasimpatek dave, kalonusteüs, mabusvöllus, isvorc'hus, diounezet da geñver ar rakkieraeziñ evit dizarbenn an andagoù hag ar c'hweliliñ.

atropinique ◇ **atropine-like** ◇ **1 atropin**vanek aa. **2 atropin**vaneg g. -eier 1 A-zivout un danvezenn gant gweredoù heñvel ouzh re an atropin. 2 Danvezenn atropinvanek.

atropisme ◇ **atropism** ◇ **atropegezh** b. Pistriadur gant ar benede pe an atropin.

attaché

• *attaché-assistant* prezour skoriad • *attaché chef de clinique* prezour penn klinik.

attaque, **accès**, **crise**, **ictus** ◇ **attack**, **seizure**, **stroke**, **fit**, **crisis** ◇ **barr** g., **barrad** g., **kaouad** b., **gwaskad** g., **resmiad** g., **strapad** g., **orc'had** g. C'hoarvezadur trumm un anadenn gleñvedel; en teir yezh ez eus un torkad termenou damheñvelster, digemmet gwech dre un arliv, gwech dre ar boaz, sk. : *barr urloù*, *barrad astma*, *kaouad paz*, *gwaskad divilhenfio*, h.a.

atteinte

• *atteinte bilatérale* tizhad daoud • *atteinte cardiaque associée* tizhad kalon kevret • *atteinte cérébelleuse ou striée* naoued an ilpenn pe ar rizeneg • *atteinte du nerf optique* tizhad an nervenn weled • *atteinte gastrique* tizhad stomok • *atteinte lésionnelle, "organique"* naoued • *atteinte microbienne* keuziad garvel • *atteinte organique ou fonctionnelle* anaez naouedel pe arc'hwelel • *atteinte rhumatismale du cœur* naoued remmel ar galon • *atteinte sensitive* strafuilh santadel.

atelle ◇ **splint** ◇ **astell** b. Lavnnenn goad, kartoñs, metal, plastr pe mezell evit derc'hel fest un ezel, ur rann ezel pe al livenn gein.

atelle en suspension ◇ **splint suspension** ◇ **astell skourr** Astell arveret er surjianerezh korfeunadel evit diloc'hekaat ur sezenn dorradur en ur lezel gant ar gouziviad frankiz da fiñval.

attentat à la pudeur ◇ **sexual offence** ◇ **darwantad** g. **revel** Embreg revel renet ouzh ur bugel pe ouzh un oadour hep e asant; kemm a laka al lezenn e Frañs etre an darwantadoù revel gant sankadur (gwallad) ha hep sankadur (sl. *outrage public à la pudeur, viol*).

atténu-

• *atténuation des fonctions psychiques supérieures* bliinaat ar bredarc'hwelioù uhel • *atténuer la douleur* distav al laur • *atténuer les symptômes de sevrage* distav azonou an dizonañ • *bacille atténué par 230 repiquages* bazhell bet bliinaet diwar-bouez 230 treuzvetaoüñ • *tumeur à malignité inconstante ou atténuée* yoc'henn anarstal pe vlin he yuted.

attците ◇ **atticitis** ◇ **askevfo** g. Seurtad krennskouarnfo, tanijennel, henek peurliesañ, an askev us-taboulin.

atticotomie ◇ **atticotomy** ◇ **askevenbenañ** Trepanañ an askorn ividig evit diraez ar skouarn grenn e par an askev ustaboulin.

attitude ◇ **attitude** ◇ **1 loadur** g. **2 lakadur** g., **emlakadur** g., **emstumm** g. **3 neuz** b., **dalc'h** g., **emstumm 4 5 emzalc'h** g., **emstumm 6 emzalc'h**, **ersav** g. **7 emzalc'h**, **tuedigezh** b. 1 Durc'hadur ar c'horf e-keñver an douaregor, sk. : *loadur ar gourvez* (sl. *position*). 2 Durc'hadur ur parzh korf e-keñver ar c'horf, sk. : *lakadur an divvrec'h war bleg*; *arzalc'h an emstummoù* (sl. *posture*). 3 Loadur pe lakadur o kennotañ keñver an den ouzh e gorf (sl. *contenance, maintien, posture*). 4 Loadur pe lakadur e kement ma tougont eul pe ster, sk. : *emzalc'h ar pediñ* (sl. *allure, aspect, expression*). 5 Meid, real, sk. : *emzalc'h aotrouniek, emstumm mitouik*. 6 Real evel respont d'ur blegenn, d'ur real, sk. : *emzalc'h e-keñver ur gudenn, ersav a zisfiz*. 7 neuz dalc'h o kennotañ ur c'hantaезд, sk. : *un emzalc'h galen, un duedigezh vadelezhus* (sl. *disposition*).

attitude

• *attitude du corps reposant sur le ventre* loadur ar c'horf astennet war e gof • *attitude résultant du mouvement d'antépuulsion* emstumm o tisoc'h diouzh ar rakkorzhañ • *attitude vicieuse* kammlakadur • *conservation d'attitudes imposées* arzerc'hel emstummoù delakaet • *maintien des attitudes* arzalc'h an emstummoù • *tonus d'attitude* tant emstumm.

attouchement

• *attouchements sur les parties génitales* touchadurioù ouzh an tachadoù ganadel.

attribu-

• *allocation attribuée à la naissance* skorenn debarzhed da geñver ar c'hanedigezh • *attribuer un taux d'invalidité* deverkañ ur feur divarregzh • *diabète attribué à la non-réabsorption de l'eau par les tubes contournés du rein* diabet e dianlen andassug an dour gant tuellennoù al lounezh • *les attributs psychologiques d'un individu* doareennoù bred ur gouzrec'h • *théorie attribuant un certain nombre de maladies à des déplacements vertébraux* arlakadenn e vez hervezi un niver kleñvedoù e diazalc'h dislec'hiadoù ar mellennoù.

attrition ◇ **attrition** ◇ **tarav** g. Kruoad muiek ur gwiad pe un organ diwar rimiañ pe breviñ (sl. *chambre d'attrition*).

atypique ◇ **atypical** ◇ **1 ec'houlun** aa. **2 3 anrizhek** aa. **4 amrizhek** 1 A-zivout ur yoc'henn a zo he doareoù kelligel hag adeiladel kevarall diouzh re ar gwiad ez eo evodet dioutañ. 2 A-zivout ur gellig a zo he doareoù neuziadurel kevarall diouzh re ar c'helligoù reol a un spesad ganti. 3 A-zivout un anaez a lakaer, da c'hortoz e anaout gwell, dindan anvad ur c'hleñved anavezet damheñvel outañ, sk. : *skeventfo anrizhek, gouvid anrizhek*. 4 A-zivout ur real, un naouuster bredel pe bevedel e disklot diouzh ar reoladoù, sk. *hentoù amrizhek ar blijadur revel*.

audibilité ◇ **audibility** ◇ **klevadusted** b. Kreñvder bevedel ur sten etre ur gwehin (kreñvder izek klevadus) hag ur gourin (kreñvder laurus).

audimutité ◇ **audimutism** ◇ **klevmuderezh** g. Muderezh ganedigel hep bouzarded, bredanaez na strafuilh er mouezhparañ.

audimutité d'expression, alalie congénitale, aphasie motrice d'évolution ◇ **congenital alalia** ◇ **klevmuderezh ezluzañ, anezluz** g. **ganedigel** Aneaz ganedigel, anezhañ kevret muderezh ha kleverezh reol ar c'homzoù.

audimutité de compréhension, agnosie auditive verbale congénitale, surdité verbale congénitale ◇ **auditory agnosia** ◇ **klevmuderezh enluzañ, anenluz** g. **ganedigel** Aneaz ganedigel ma 'z eo mut ar gouziviad hep bezañ bouzar, met ne vez ket al lavar teodel hag eñ reol e veizegezh a du 'rall.

audiogramme ◇ **audiogram** ◇ **klevdresenn** b. Krommenn disoc'h ar c'hlevdresennañ.

audiographie ◇ **audiography** ◇ **klevdresennañ** Kevregañ disoc'hoù ar c'hlevandalañ e rezh ur grommenn o terc'hennañ ar gwehinoù klevadusted a-gevreizh d'an talmoù.

audiologie ◇ **audiology** ◇ **klevedouriezh** b. Diskiblezh vezegel o plediñ gant kement a denn d'ar c'hleved.

audiomètre ◇ **audiometer** ◇ **stenc'haner** g. **-ioù, aodiometr** g. **-où** Ardivink o c'henel stenioù pur reolet o read (o c'hreñvder fizikel) hag o zalm, arveret da andalañ ar c'hleved.

audiométrie ◇ **audiometry** ◇ **klevandalañ** Muzul ar c'hleved, eleze savelañ ar gwehin klevadusted hervez talm ar stenioù (uc'hder ar sonioù) diwar-bouez ur sonc'haner.

audioprothèse ◇ **audioprothesis** ◇ **klevosodouriezh** b. Diskiblezh lezvezegel o plediñ gant an ardivinkoù o parraat ouzh ar bouzarderioù dec'havael (klevosodoù).

audioprothésiste ◇ **hearing prothetist** ◇ **klevosodour** g. **-ion** Kalvezour arbennikaet da aozañ klevosodoù.

auditif : **prothèse** ~ve ◇ **hearing prothesis** ◇ **klevosod** g. Amplaer stenioù savet evit parraat ouzh ar bouzarderioù dec'havael.

audition ◇ **hearing** ◇ **kleved** g., **kleverezh** g. Skiant merzhout ar stenioù.

audition active, passive ◇ ◇ **kleved oberiat, gouzañvat** Kemm lakaet etre selaou ha klevout hep evezh.

audition colorée, pseudochromesthésie ◇ **pseudochromaesthesia, chromatic audition** ◇ **livglev** g. Dec'havaelañ skeud-ennoù liv da geñver klevout stenioù; ar brizheraez paotañ eo al livglev.

audi-

- *agnosie auditive* andenaoud klevedel, klevandenaoud
- *audible* klevadus
- *champ auditif* gavael kleved
- *inaudible* anklevadus
- *l'audition colorée est la plus fréquente des pseudesthésies* ar brizheraez paotañ eo al livglev
- *normalement audible pour l'homme* klevadus ent reol gant mab den
- *sensation auditive* kleveraezadenn
- *seuil d'audibilité* gwehin klevadusted.

augment-

- *augmentation anormale de volume d'une oreillette* muiad ezreol eus ec'honad ur c'hentez, kentezsvent
- *augmentation de l'activité motrice* muiadur ar fiñverezh
- *augmentation de l'aire d'une surface* muiad ur gorread
- *augmentation de l'érythropoïèse* muiadur ar ruzparañ, ruzuspar
- *augmentation de la pression diastolique* muiad ar gwask diastolek
- *augmentation de volume du cœur* muiad ec'honad ar galon
- *augmentation du débit cardiaque* muiadur kas ar galon, uskas kalon, kalonuskas
- *augmentation rapide de la pression intrapleurale* muiadur herrek ar gwask etre-krezoù
- *augmenter* muiaat
- *augmenter l'idéation* blivaat an arc'hwelerezh bred, blivaat ar bredarc'hwelañ
- *augmenter ou diminuer la respiration* muiaat pe leiaat an analerezh
- *l'élévation du pH augmente l'affinité de l'oxygène pour l'hémoglobine* gant uheladur ar pH e vuia krafusted an oksigen ouzh an hemoglobin
- *une phase d'augmentation progressive du volume courant, suivie par une phase de diminution progressive* ul lankad muiaat argammedek an ec'honad red, heuliet gant ul lankad leiaat argammedek.

aura ◇ **aura** ◇ **aora** g. 1 Kammzerc'h avel (latin *aura*) gant gouziviaded 'zo a-raok ur barrad droukfell, termen bet kentradet gant Galenos hag astennet da ragazonoù all, skiantennel, emanglevadell pe vredel. 2 Dre un eil astenn ez eo bet lakaet da arouezñ ragazonoù barradoù all (astma, h.a.) (sl. *prodrome, signal symptôme*).

auriculaire ◇ **auricular** ◇ **1 skouarnel** aa., **~skouarn** 2 kentezel aa., **~kentez** 3 **skouarnigel** aa., **~skouarnig** 4 **biz** g. **bihan** 1 A-zave d'ar skouarn. 2 A-zave d'ar c'hentez. 3 A-zave d'ar skouarnig. 4 Pempet biz an dorn.

auriculotomie ◇ **auriculotomy** ◇ **ezvenañ skouarnig, skouarnigezvenañ** Dazbidañ ur skouarnig.

auriculotemporal : **syndrome de l'~** ◇ **auriculotemporal syndrome** ◇ **azoniad an nervenn blegskouarn-ividig** Azoniad o tarvezout er mizioù da c'houde ur c'hilvoc'hezvenañ, anezhañ ur c'hweziñ devoudet gant ar chaokat e tachenn an nervenn blegskouarn-ividig, kevret a-wechoù gant an is- pe an uc'heraez kroc'hen ha strafuilhoù borc'hañ ar gilvoc'henn.

1 auriculotomie, atriotomie 2 **auriculotomie** ◇ **1 auriculotomy, atriotomy** 2 **auriculotomy** ◇ **1 kentezenbenañ** 2 **skouarnigenbenañ** 1 Digeriñ surjaniel ar c'hentez war-benn oberata un anaf kalon. 2 Digeriñ surjaniel ur skouarnig.

auricul-

- *bloc auriculoventriculaire* tolc'had kentez-kofig
- *bloc interauriculaire* tolc'had etre-kentezoù
- *bloc sino-auriculaire* tolc'had god-kentez.

auride ◇ **auride** ◇ **aurid** g. **-où** Darvoud kroc'hen (dispuilhad, eritem, gouliñv, dispeliad) stadet a-wechoù da geñver an aourgurañ.

- auriste, otologiste** ◇ **aurist, otologist** ◇ **skouarnour g. -ion** Mezeg o pleidiñ ent arbennik gant kleñvedoù an divskouarn.
- auscultation** ◇ **auscultation** ◇ **selaouennañ** Kalvezder imbourc'h klinikel, anezhañ selaou an trouzoù bonan pe gleñvedel o tont eus diabarzh ar c'horf; a-c'houde Laennec e tiforc'her ar *selaouennañ kentizhek* graet dre arloañ ar skouarn ouzh ar parzh erc'hwiliet hag ar *selaouennañ handizhek* dre hantererezh ur stetoskop; ent klasel ez a ar selaouennañ d'ober unan eus pevar araezad an imbourc'h klinikel, an tri all o vezañ an ensellout, an teuta, ar c'hiziata.
- auscultation** : **foyer d'~** ◇ **auscultation area** ◇ **selaouennva g. -où** Lec'hienn eus ar rannbarzh argalonel ma klever ent vonan dre ar selaouennañ trouzoù ar gwaskoù kalon : ar *selaouennva mintrek* (er gern), ar *selaouennva aortek* (en eil tachad etre-kostoù dehoù), ar *selaouennva a-skevent* (en eil pe en trede tachad etre-kostoù kleiz), ar *selaouennva tribroudek* (el lech).
- auscultatoire** : **méthode** ~ ◇ **auscultatory method** ◇ **hentenn b. selaouennel** Arver un anro hevolc'h, outañ ur gwask-venter, hag ur stetoskop divskouarnel da vuzuliañ gwask ar gwad; ar gwask en anro a gaser betek skoilhañ ouzh an amred talmerel er vrec'h hag a lezer da ziskenn gorrek; al lamm kentañ a glever a ro da anaout ar gwask uc'hek, al lamm diwezhañ ar gwask izek.
- auscultatoire** : **trou** ~ ◇ **auscultatory gap** ◇ **ode b.-où selaouennel** Anadenn stadet pa vuzulier gwask gwad gouziviaded 'zo (ganto uswask pe skorted aortek) : tra ma tiskenn ar gwask ne glever mui al lammoù edoug un nebeut eilennoù hag en o c'hlever en-dro betek diraez ar gwask izek.
- autacoïde** ◇ **autacoid** ◇ **aotakoid g. -où** Anvad rumm evit danvezennoù o tiwanañ e-barzh kelligoù un organ hag o tremen er gwad, dezho lianiñvegezh vras, anezho daou seurtad hervez ma vezont broudus (*hormonoù lec'hiek*) pe hualus (*chaloù*) (sl. *chalone*).
- autisme** ◇ **autism** ◇ **aotegezh b.** Azoniad bet deskrivet gant Bleuler e 1911, anezhañ an emdenn hag an enbac'hadur en eriuñelloù war un dro gant an distroc'h diouzh ar gedvuhez; termen lakaet da gentañ da verkañ derez eizhañ ar skizofreniezh, a denner hiziv da arverañ evel kenster da *aotegezh vabanel*.
- autisme infantile, syndrome de Kanner** ◇ **early infantile autism** ◇ **aotegezh b. vabanel** Azoniad deskrivet e 1943 gant Kanner evel diforc'h diouzh ar skizofreniezh, e rezh ur psikoz o teraouiñ a-raok dibenn an eil bloavezh, azonet gant an distroc'h klok diouzh an dud hag an traoù, ar jestroù bloc'heiladek hep amkan meizadus, ezvezañs al lavar (mudegezh, mouezhiadoù hep ster, drec'hluizadoù), kaouadoù konnar da geñver an disterañ direnkadur en amgelc'h, e dargemm ouzh ur veizegezh lemm hag ur c'hounerezh bras.
- autiste** ◇ **autistic** ◇ **1 aotek aa. 2 aoteg g. -eion 3 aotegezhel aa., aotek aa.** 1 Gant an aotegezh. 2 Gouziviad an aotegezh. 3 A-zave d'an aotegezh.
- auto-accusation** ◇ **autoaccusation** ◇ **emdamall g.** Ambren ma tisklerier drezi bezañ kablus a dorfedoù grevus pe grevusoc'h; azon stadet e lies bredanaez, met peurliesañ er velankoliezh.
- auto-agglutination** ◇ **autoagglutination** ◇ **unandazgludañ** Dazgludañ an hemati dre zargwered un antikorfe bezant er gwad-veiz ouzh un antigen bezant enno.
- auto-agglutinine** ◇ **autoagglutinin** ◇ **unanaglutinin g.** Anvad lakaet war antikorfe ar gwadveiz o tec'han dazgludañ an hemati.
- auto-analyseur** ◇ **autoanalyzer** ◇ **elfenner g. -ioù emgefreak, ootoanalizer g. -ioù** Ardivink imbourc'hva Bevoniezh oc'h elfennañ emgefreak liñvennoù ar bevedeg.
- auto-anticorps** ◇ **autoantibody** ◇ **unanantikorf g. -où** Antikorfe a 'r gwadveiz o targwerediñ ent spesadel ouzh ur parzh (gwiad, organ) eus ar bevedeg en deus e vorc'het.
- auto-antigène** ◇ **autoantigen** ◇ **unanantigen g. -où** Antigen lodek en ur bevedeg hag en araez da zec'han ar borc'hadur gant ar bevedeg end-eeun eus antikorfoù erwezhius outañ (unanantikorfoù).
- auto-immune** : **maladie** ~ ◇ **autoimmune disease** ◇ **kleñved g. -où unanhangaeel** Hangaeañ ar bevedeg ouzh parzhioù 'zo anezhañ e unan : borc'hañ a ra antikorfoù (unanantikorfoù) dazgweredus ouzh antigenoù lodek ennañ (unanantigenoù).
- auto-immunisation** ◇ **autoimmunization** ◇ **unanhangaeañ** Gant ur bevedeg, borc'hañ antikorfoù dazgweredus ouzh parzhioù anezhañ e unan; da skouer, an diwanañ er gwadveiz eus antikorfoù oc'h ober d'an hemati dazgludañ (sl. *auto-agglutination*).
- auto-immunité, auto-allergie, auto-agression, auto-sensibilisation** ◇ **autoimmunity** ◇ **unanhangae g.** Stad ur bevedeg ma targwered antikorfoù (unanantikorfoù) ouzh antigenoù eus an un bevedeg evel pa vijent "estren" dezhañ (unanantigenoù); kemm a lakaer etre an *unanhangae bonan* (araezet gant an antikorfoù genidik, IgM dreist-holl, perzhiaet e kempouez ar reizhiad hangaeel) hag an *unanhangae anvonan* a-geñver gant erzerc'hadoù kleñvedel (e dalc'h unanantikorfoù, IgG, IgA, IgE, o wezhiañ ouzh unanantigenoù); emañ an unanhangae en orin *kleñvedoù unanhangaeel* pe *kleñvedoù unangeuziadel* evel al lupuz eritematus strewek, an amwad loezadel unanhangaeel, ar purpura olpladanel, kleñvedoù Biermer, Addison, Basedow, ar viasteniezh, an diabet c'hwek insulinrankus.
- auto-infection** ◇ **autoinfection** ◇ **unanbore g.** Pore diwar hadennoù bezant ent dinoaz er bevedeg, aet kleñvedus dre benn un amveziad evel kresk o anial pe digresk harzusted ar bevedeg.
- autocatalyse** ◇ **autocatalysis** ◇ **kordreluskañ, kordrelusk g.** Muiaat buanez un dazgwered dre zelanvad un aozenn o tisoc'h diouzh an dazgwered e unañ.
- autochtone** ◇ **autochtoneus** ◇ **broat aa.** A-zivout ur pore dastumet er vro end-eeun m'emañ ar c'hlañavour o chom.

- autocinétisme** ◇ ◇ **darloezañ** Fiñval diarzoug diforc'h diouzh an damouezh dre ma vez arzeuat, diouzh an darblegañ dre ma tisoc'h eus an hirvoaziañ.
- autoclave** ◇ **autoclave** ◇ **aotoklav** g. -ioù Ardivink dishadennañ diwar-bouez ar vurezh dindan wask.
- autocrinie** ◇ ◇ **korenborc'h** g., **korenborc'hadezh** b. Seurtad enborc'hañ ma vez delanvadet ar gellig gant he enborc'hadou he unan.
- autocritique** ◇ **self-criticism** ◇ **emzezvarn** g. Barregezh ar gouzrec'h da dreiñ ur sell deznadiñ outañ e unan, ouzh e oberoù hag e emzalc'hioù.
- autodialyse** ◇ **autodialysis** ◇ **aotodializ** g. Dializ araezet gant ar gouziviad e unan.
- autodigestion** ◇ **autodigestion** ◇ **emgoazhañ** Koazhañ ar benvegad koazhañ (stomok, ilgreiz) gant e vorc'hadou piaouel.
- autogrefe**, **greffe autologue**, **autoplastie**, **greffe autoplastique** ◇ **autograft** ◇ **unanimboud(añ)** g., **imboud(añ)** g. **unanien** Imboudañ ma teu an imboudenn eus ar bevedeg e unan.
- autohémolyse** ◇ **autohaemolysis** ◇ **gwadunanloezañ** Distruj an hemati e-barzh plasma piaouel ar gouzrec'h.
- autologue** ◇ **autologous** ◇ **unanien** aa. A-zivout nep danvezenn vevel erlamet diouzh ar bevedeg e unan.
- 1 autolyse**, **autophagie**, **autoprotéolyse** ◇ **autolysis** ◇ **unanloezañ**, **unangoazhañ** Distruj un organ, ur gwiad, ur gellig dre wered an enzimoù bezant enno, en ezvezañs nep parenn diavaez.
- 2 autolyse**, **suicide** ◇ **suicide** ◇ **emlazañ**, **emlzh** g. Emlakaat d'ar marv.
- autolysine**, **autohémolysine** ◇ **autolysin** ◇ **aotolizin** g. Danvezenn bezant er bevedeg hag o tistrujañ an hemati anezhañ.
- 1 automatique** ◇ **automatic** ◇ **emgefreek** aa. A-zivout ur reizhiad alvezel en araez da arc'hwelañ hep emell an den.
- 2 automatique** ◇ **automatic** ◇ **1 emgefreek 2 diarzoug** aa. 1 A-zivout ur reizhiad vevedel e kement m'he deseller evel reizhiad alvezel, sk. : an damougoù studiet evel gwezhiadoù emgefreek. 2 A-zivout ur gwezhiad andiarvenn e kement m'en deseller en e zarempred gant an oberoù diarvenn, sk. : an analañ studiet en e zaou arvez diarzoug ha diarvenn (sl. *intentionnel, volontaire*).
- automatiser** ◇ **to automatize** ◇ **1 emgefreakaat 2 diarzoukaat** 1 Lakaat da vezañ emgefreek. 2 A-zivout oberoù diarvenn, dont da vezañ diarzoug.
- 1 automatisme** ◇ **automatism** ◇ **1 emgefrec** b. -où **2 emgefrec** b. 1 Reizhiad alvezel en araez da arc'hwelañ hep emell an den. 2 Perzh emgefrec ur reizhiad alvezel.
- 2 automatisme** ◇ **automatism** ◇ **1 emgefrec** b. -où **2 emgefrec** b. **3 diarzoug** g. 1 Reizhiad vevedel e kement m'he deseller evel ur reizhiad alvezel, sk. : studiañ an neuronenn evel un emgefrec. 2 Perzh emgefrec ur reizhiad vevedel, sk. : emgefrec en un damougoù. 3 Perzh diarzoug ur gwezhiad, sk. : e pep jestr diforc'hiñ an diarzoug hag an diarvenn.
- automatisme épiléptique**, **automatisme comitial ambulatoire** ◇ **postepiléptique automatism** ◇ **diarzoug droukfellel**, **bale diarzoug** Fiñverezh andiarvenn, kenurzhiat hag azas well-wazh, e ser ar stad koabrennegezh o tarvezout e-doug pe da heul ur barrad droukfell.
- automatisme médullaire**, **réflexe d'~** ◇ **spinal automatism** ◇ **melemgefren** g. Gwezhiad damougek oc'h erzerc'hañ e parzh traoñ ar mel a-livenn goude skejadur daraezet hemañ; dezverc ar melemgefren eo an *damoug triemden* (sl. *triple retrait*).
- automatisme mental**, **syndrome de Clérambault** ◇ **mental automatism** ◇ **darc'hwelerezh** g. **bred** Azoniad bred o c'hoarvezout eus trezerc'hioù diabarzh : sevel a ra da spered ar gouziviad dezevou na anavez ket evel e re, a vuhez evel o tont eus an amgen, o hekleviñ d'e re, ouzh o diaraogiñ, o titouriñ ar pezh emañ o vont da lavarout, d'ober, o c'hourlakaat dezhañ realoù, lavaroù, dezevou, kantaezadoù, emanglevadoù; alies e vez an darc'hwelerezh bred prantad deroù ur *psikoz ambreel henek* (sl. *psychose délirante chronique*).
- automatisme vésical** ◇ **bladder automatism** ◇ **1 diarzoug c'hwezhiad 2 dezioulañ emgefrec** 1 Dezioulañ en e zaou lankad, diarzoug ha diarvenn, dec'hanet gant leunder ar c'hwezhiad pe gant ur c'hentrigañ kroc'hen. 2 Damoug dezioulañ diwar melemgefren, da heul un anaf er mel a-livenn.
- automédication** ◇ **self-treatment** ◇ **emvezegañ** Prederiañ lael divizet gant ar gouziviad e unan kuit a ordrenañs digant ur mezeg.
- automutilation** ◇ **automutilation** ◇ **emvturniañ** 1 Muturniañ an unan war-benn kaout un dic'haou pe un disluadur. 2 Azon bredkleñvedel, muturniañ an unan, e rezh ur gloazañ pe un ambidañ (emspazhañ), stadet er velankoliezh, er skizofreniezh, en dilerc'hegezh don.
- autophonie**, **tympanophonie** ◇ **autophony**, **tympanophonia** ◇ **dazvouezh** b. Dasson ar vouezh an unan da geñver klañvadurioù eus ar skouarn grenn.
- autoplastie** ◇ **autoplasty** ◇ **unanatelviñ** Kalvezder ratreañ surjanel o tanveziñ un tamm gwiad (kroc'hen, kaheer, askorn) erlamet diouzh ar gouziviad e unan.
- autopsie**, **nécropsie**, **nécropsicopie** ◇ **autopsy**, **autopsia**, **necropsy**, **necropsy** ◇ **kelanskejañ**, **kelanweliñ** Ensallout ha deskrivañ parzhioù diavaez ha diabarzh ur c'helan; kemm a lakaer etre ar *c'helanweliñ mezegel* graet en ospital gant mezeion neuzkleñvedour pe get, war-benn dizoleiñ arbenn ur marv hag ar *c'helanweliñ lezenvezegel* war-benn pivadiñ ur c'helan pe dizoleiñ hag arbenn ur marv dindan c'housesell zo naturel, darvoudel pe dorfedel.

autopunition ◇ **self-punishment** ◇ **emgastizañ** Gwanañ an unan o vont betek an emlazhañ da heul santad ar gablusted; realezh stadet er velankoliezh, en neuroziou mac'hennel pe arurel.

autoradiographie ◇ **autoradiography** ◇ **stafłuniñ**, **autoradiografiñ** Skinluniñ graet dre stafañ ur film kizidik war c'horre un dafar a zo ennañ danvezennoù skinoberiek.

autorisation de mise sur le marché (AMM) ◇ **marketing authorization application (MAA)** ◇ **brientad g. mont en nevid (BMN)** Aotre amaezhiadurel da genwerzhelañ ul lia nevez.

autoscopie ◇ **autoscopy** ◇ **emdrezerc'hañ** Merzhout pe derc'h an unan evel en ur melezour (*emdrezerc'hañ diavaez*), pe derc'h an organoù an unan (*emdrezerc'hañ diabarzh*).

autosome ◇ **autosome** ◇ **aotozom g.** Kromozom o tougen hilstlennadoù dizalc'h diouzh desaveladur ar rev, e kemm ouzh ar gonozomoù (sl. *caryotype, gonosome*).

autosuggestion ◇ **autosuggestion** ◇ **emc'houdeñ** Emlevezonañ war ur mennoz hep soliañ war estreget ar mennoz e unan.

autotolérance ◇ ◇ **unanc'hougemer g.** Ezvezañs a erwezhañ hangael a-berzh ur bevedeg ouzh e antigenoù piaouel (sl. *auto-antigène, auto-immunisation*).

autotopo-agnosie ◇ **autotopoagnosia** ◇ **andenaoud g. an emegor, emegorandenaoud g.** Strafuilh a laka ar c'hlañavour dic'houest da zelec'hiañ ha da zeanviñ parzhioù e gorf.

autotransfusion ◇ **autotransfusion** ◇ **dasskuilhañ** Da geñver ur gwezh surjanel, daskoriñ dre dreuzskuilhañ d'ar gouziviad ar gwad en deus kollet e-doug an oberatadenn.

autotrophe ◇ **autotrophic** ◇ **kevandeñvek aa.** A-zivout ar bevion a denn o boued war eeun eus ar metoù meinel, o teñvañ dre gevanaozañ danvezennoù o beved diwar danvezennoù anvevel.

autovaccin ◇ **autovaccin** ◇ **unanvaksin g.** Vaksin aozet dre diñvañ garvevion erlamet diwar ar gouziviad ha diounezet dezhañ.

auxiliaire

- *auxiliaire médical* eiler mezegel.

auxine, phytohormone ◇ **auxin, phytohormone** ◇ **aoksin g., fitohormon g.** Danvezenn heñvel he roll er riezad plantel ouzh roll an hormon er riezad loenel.

auxologie ◇ **auxology** ◇ **kreskoniezh b.** Studi skiantel ar c'hreskiñ bevedel.

avant-bras ◇ **fore arm** ◇ **arvrec'h b.** Rann a 'n ezel krec'h etre an ilin hag an arzorn; daou askorn a ya d'ober an atel anezhi : ar werzhid en diavaez, an helmo en diabarzh, stignet etrezo al lienenn etreeskernel o tispertiañ ar rannbarzh araok diouzh ar rannbarzh adreñv.

avant

• *avant-pied* araog troad • *descente anormale du cordon ombilical en avant de la présentation* diskenn ezreol eus ar funig vegele dirak an erloadur • *en dehors ou en avant de la veine* en diavaez pe en diaraog eus ar wazhienn • *oblique en avant* aveskell war raok.

aveugle ◇ **blind** ◇ **1 dall aa. 2 dall g. -ed** 1 Hep skiant ar gweled. 2 Den a zo e lemmded weled dindan 1/20 eus ar gweled reol.

aveugle : *tache ~, tache de Mariotte* ◇ **blind spot** ◇ **brizhenn b. dall** Skotom bonan a-geñver gant begenn an nervenn weled.

aveugle

- *hémianopsie où la limite des champs visuels voyant et aveugle est horizontale* ledangwel a zo a-zremm gantañ ar vevenn etre ar gwelvaez hewekek hag ar gwelvaez angwekek.

aviateurs : **mal des ~, fatigue des ~** ◇ **aeroneurosis** ◇ **ogvez b. an nijerion** Azoniaid diwask hollek, ouzh e ober distabiled nervel, mineuzid, skuizhez kigennel, anhun, ustead kalon, strafuilhoù ar c'hoaz-hañ, treutaat, o tarvezout gant an nijerion regaset, a zispleger bet wered kevret an uhelder, an isvec'h oksigen, ar gwadisvec'h CO₂, ar yenion, ar c'hwimm, ar vrac'hitell.

avitaminose ◇ **avitaminosis** ◇ **avitaminoz g.** Teskad anadennoù kleñvedel diwar negez ur vitamin.

avivement ◇ **avivement** ◇ **dazbevaat** Amnaziñ pe vliañ ar gwiadoù marvennet pe saotret eus ur gouli war-benn devriañ ar gwiadoù bonan hag aesaat ar c'hleizennañ.

aviv-

- *avivement et suture des parois* dazbevaat ha krafaelañ ar speurioù • *aviver les bords d'une plaie* dazbevaat bevennoù ur gouli.

avortement ◇ **abortion** ◇ **1 sioc'haniñ 2 arzheñ** 1 Ezvountañ emdarzh pe devoudet ar rizhell pe ar grouell kent ampoent ar bevuster; al lezenn a zifer ar 180t devezh eus ar vrazzeded evel ampoent ar bevuster, nemet e c'haller hiziv derc'hel bev ha yac'h bugale bet ganet kent an termen-se. 2 Astal a-raok termen an argerzh eus an diorreadur : paouez parañ parzhioù eus ar rizhell, arsav en azvedigezh kelligoù 'zo.

avortement chromosomique, avortement génétique ◇ **sioc'haniñ kromozomel, sioc'haniñ hilel** Marv ar rizhell e-kerz sizhunioù kentañ ar vrazzeded e dianlen ur gouskoevad kromozomel.

avortement habituel, avortement à répétition ◇ **habitual abortion** ◇ **sioc'haniñ arreat** Kolladenn genrat o tarvezout da geñver pep bec'hiegi.

avortement provoqué ◇ **induced abortion** ◇ **sioc'haniñ gwezhiat, divec'hiegañ** Sioc'haniñ o c'hoarvezout dre un araezad lec'hiek (gwezhiñ treloc'hel) pe hollek (diounit hormonou); hervez abeg ar sioc'haniñ gwezhiat e lakaer kemm etre an *divec'hiegañ yac'hadel*, erskrivet gant ar mezeg evit gwarediñ yec'hed ar vamm, hag an *divec'hiegañ devredet* e-maez selledoù mezegel.

avortement spontané, fausse couche ◇ **spontaneous abortion** ◇ **sioc'haniñ emdarzh, kolladenn b.** Diforc'h diwar vugale o tarvezout dre un arbenn kleñvedel.

avortement tubaire ◇ **tubal abortion** ◇ **sioc'haniñ korzennel** Difloskiñ a'r vi speriet hag an ezvoutañ anezhañ dre gorzenn ar grozh, o tevoudañ ur gwadliñv e kavenn ar grozh (*sioc'haniñ korzenn-krozh*) pe e kavenn an ampeleñ (*sioc'haniñ korzenn-ampeleñ*).

avulsion, extraction ◇ **avulsion** ◇ **digewanañ, dichontrañ** Diframmañ, dreist holl a-zivout an dent.

axe de fixation ◇ **fixation axis** ◇ **ahel g. -ioù steudañ** Eeunenn oc'h eren ar poent studeet outañ ha kreiz c'hwelañ ar vull lagad (sl. *angle gamma*).

axe diencéphalo-hypophysaire, axe hypothalamo-hypophysaire ◇ **hypothalamo-hypophysial axis** ◇ **ahel gouzerc'hvel-gougorfenn** Meizad korfadurel-bevedourel diazezet war an darempredoù nerval-hormonel a zo etre kreizennoù an treuzempenn, ar gouzerc'hvel pergen, hag ar c'hougorfenn; dindan ar meizad-se emañ ar c'healiou a skoilherenn, a elloerenn, an nervenborc'hañ (sl. *facteur déclenchant, facteur inhibant, neurocrinie*).

axe électrique du cœur ◇ **electrical axis of the heart** ◇ **tredanahel g. -ioù ar galon** Eeunenn bet despizet evel oc'h eren an daou boent eus ar galon a zo etrezo en e vrasañ ar c'hemm barr stadet dre ar c'halonvarrezañ.

axe optique ◇ **optical axis** ◇ **luc'hahel g. -ioù** Eeunenn oc'h eren blein mentoniel a-dreñv al lagad ha kreiz mentoniel ar gornsaes (sl. *angle alpha*).

axe pupillaire ◇ **pupillar axis** ◇ **mabahel g. -ioù** Serzhenn ouzh ar gornsaes dre greiz ar mab lagad (sl. *angle kappa*).

axe visuel ◇ **visual axis** ◇ **gwelahel g. -ioù** Eeunenn oc'h eren ar rioul greiz hag ar poent studeet dioutañ.

axénique ◇ **axenic** ◇ **disgarvev aa.** A-zivout loened imbourc'hva savet e-maez a bep keraz garvevel.

axes de rotation ◇ **rotation axis** ◇ **aheliou c'hwelañ, c'hwelaheliou l. (g.)** Eeunennoù ma c'hwel ar vull lagad en dro dezho; un diniver ez eus anezho dre benn ma c'hell al lagad treiñ war bep tu; koulskoude er c'hlinik e tiforc'her tri ahel pennañ: ar *c'hwelahel a-zremm* a c'hoarvez en dro dezhañ ar *fiñvoù gorren* ha *gouzizañ*; ar *c'hwelahel a-saezh*, pe c'hwelahel araok-adreñv, a c'hoarvez en dro dezhañ ar *fiñvoù enrodañ* hag *ezrodañ*; ar *c'hwelahel a-zerc'h* a c'hoarvez en dro dezhañ ar *fiñvoù entuañ* hag *eztuañ*.

axile ◇ **axile, axial** ◇ **ahel g., ahel-** A-zave d'un ahel, sk.: mistiwel ahelel.

axolème ◇ **axolemma** ◇ **aksolemm g.** Kennenn vonnañ kitoplasm an akson.

axone ◇ **axon** ◇ **akson g.** Astennad kitoplasm diouzh korf an neuronenn, en dro dezhañ pe get ur feur vielin, drezañ ren kreiztec'h an nervlanv.

axonge ◇ **axungia, adeps, grease** ◇ **bloneg g.** Lard moc'h, darbaret dre deuziñ ha silañ, danvezet gwechall da ambrougenn en oganou.

axonotmésis ◇ **axonotmesis** ◇ **aksondroc'h g.** Freuz an aksonou da heul kreud an nervenn.

azoospermie ◇ **azoospermia** ◇ **sperankellig g.** Ezvezañs spergelligoù e-barzh ar sper.

azote résiduel ◇ **residual nitrogen** ◇ **nitrogen g. dilerc'h** Diforc'h etre ar bec'hiou er gwadvez eus an nitrogen hollek anproteek hag an nitrogen ureek.

azote total non protéique ◇ **non-protein nitrogen** ◇ **nitrogen hollek anproteek** Nitrogen eus ar plasma, e-maez an hini kediet er proteinou.

azotémie ◇ **azotaemia** ◇ **1 gwadvec'h g. nitrogen 2 gwadvec'h urea 3 gwadusvec'h urea** 1 Feur nitrogen anproteek er gwadvez (arver dibaot). 2 Feur urea er gwadvez. 3 Feur reñverek urea er gwadvez (sl. *hyperazotémie*).

azotémique : syndrome ~ ◇ **uraemic syndrome** ◇ **azoniad g. ureek** Azoniad a stader e dibenn dedroadur ar skorted loun-ezh, anezhañ teskad an anadennoù devoudet gant daspugn an urea er gwad: strafuilhoù koazhadel (c'hweladoù dourek, kac'hadoù liñvel ha gwadek) ha nerval (morgud o vont betek ar c'homa, mic'hwezh Cheyne-Stokes) (sl. *urémie*).

azotorrhée ◇ **azotorrhoea** ◇ **kac'husvec'h g. nitrogen, nitrogenver g.** Feur reñverek an nitrogen en oulennoù, azon ar skorted ilgreiz.

azoturie ◇ **azoturia** ◇ **1 troazhvec'h g. nitrogen 2 troazhusvec'h g. nitrogen 3 troazhusvec'h urea** 1 Feur an nitrogen en troazh. 2 Feur reñverek nitrogen en troazh. 3 Feur reñverek urea en troazh.

azot-

• *alcool azoté* alkool nitrojenek • *matières azotées* danveziou nitrojenek • *substances azotées* danvezennou nitrojenek.

azurophile ◇ **azurophil** ◇ **azurlen** aa. A-zivout an elfennoù luniek lenidik ouzh an eoziat azur, livuzenn ruz-mouk.
azygographie ◇ **azygography** ◇ **amparluniñ** Skinluniñ diuzel ar wazhienn ampar.
azyme ◇ **azymic** ◇ **dic'hoell** aa. A-zivout ar bara graet hep goell.

B

Babinski : *signe de ~* ◇ **Babinski's toe sign** ◇ **arouez** b. **Babinskiphantom** Astennidigezh ar meud troad hag, anarstal, ar bizied troad all da heul ur gentrigidann ouzh parzh diavaez ar sol troad, azonus d'un anaf er stirad pikernennek.

baby blues ◇ **baby blues** ◇ **doan** b. a 'r **c'havell**, **baby blues** g. Gouvid leik berrbad gant ar vamm goude gwilioudiñ.

bacillaire ◇ **bacillar** ◇ **1 bazhellek** aa. **2 bazhelleg** g. **-eion** **3 bazhellel** aa. 1 O tougen bazhilli, tizhet gant bazhilli (Koch peurliesañ). 2 Klañvour bazhellek (torzhellek peurliesañ). 3 A-zave d'ar bazhilli.

bacille ◇ **bacillus** ◇ **bazhell** b. **-illi** Anvad rumm ar bakteri dezho stumm ur vazh vihan.

bacilloscopie ◇ **bacilloscopy** ◇ **bazhellselliñ** Imbourc'h korrgreskerel war un dafar bevel (skopad, lin, liñvenn grezoù, h.a.) war glask bazhilli, a 'n dorzhellegezh peurliesañ.

bacillöse ◇ **bacillosis** ◇ **bazhellegezh** b. Heñvelster da dorzhellegezh skevent.

bacillurie ◇ **bacilluria** ◇ **troazhvazhellegezh** b. Bezañs bazhilli (a 'n dorzhellegezh peurliesañ) en troazh.

bactéri-

- *pouvoir bactéricide* bakterilazhusted
- *sur le plan bactériologique* e-keñver bakteriouriezh.

bactéricide ◇ **bactericidal** ◇ **bakterilazh** aa. Gant ar perzh lazhañ ar bakteri.

bactéride ◇ **bacterid** ◇ **bakterid** g. **-où** Burbuenn ventek o c'houzalc'h sav a-bezh an ezkroc'henn, hep garvevion en he liñvenn; bez' e ve anezhi un erwezhiad allergek a-bell ouzh un annon pore loet en ul lec'h all eus ar bevedeg.

bactéries ◇ **bacterium** l. : **bacteria** ◇ **bakteri** s. Anvad rumm garvevion gougevret ouzh riezad ar Protisted, skourrad ar Skizomiket; dezho ur graoñell hep koc'henn, gant ur c'hromozom hepken; gouennañ a reont dre zaouhanteriñ eeun; lies stumm ganto : pellennek (kok), kranennek (bazhilli), troellennek (spiroket, leptospir, treponem).

bactéries opportunistes ◇ **opportunistic bacteria** ◇ **bakteri koulzataer**, **bakteri kevaraezet** Bakteri saprofitiek o vont da gleñvedus pa vlina difennoù ar gouziviad a roe bod direuz dezho.

bactériémie ◇ **bacteriaemia** ◇ **gwadvakteriegezh** b. Bezañs bakteri er gwad amredat; aozerion 'zo a ro an anvad-se d'ur stad verbad hep erzerc'had klinikel; aozerion all a ra eus ar wadvakteriegezh un anvad rumm evit kement bezañs vakteri er gwad, adalek ar stadoù anklinikel betek ar wadlestegezh hag ar wadlinegezh.

bactériocine ◇ **bacteriocin** ◇ **bakteriokin** g. Danvezenn broteek antigenek danzeet gant garvevion a skodoù anialek en araez da lazhañ garvevion a skodoù ananial un- pe allspesad.

bactériologie ◇ **bacteriology** ◇ **bakteriouriezh** b. Rann a 'r Vezekniezh o plediñ gant studi ar bakteri.

bactériolyse ◇ **bacteriolysis** ◇ **bakteriloezañ** Distrujañ ar bakteri gant danvezennoù enepbakteri, bevastalerioù, h.a.

bactériolysine ◇ **bacteriolysin** ◇ **bakteriolizin** g. Antikorf (un immunoglobulin M peurliesañ) en araez, goude kediañ gant ar glokaenn, da zistrujañ ar bakteri.

bactériolytique ◇ **bacteriolytic** ◇ **1 bakteriloezus** aa. **2 bakteriloezadel** aa. 1 En araez da zistrujañ ar bakteri. 2 A-zave d'ar bakteriloezañ.

bactériopause ◇ ◇ **bakterispan** g. Steuz kleñvedusted ar garvevion dre wered bevastalerioù eus kerentiezh ar makrolidoù na lazont ket ar bakteri met a chom daspugnet enno.

bactériopexie ◇ **bacteriopexy** ◇ **bakterilenañ** Arc'hwel un organ, ur gwiad, ur gellig, anezhañ pakañ bakteri.

bactériopexique ◇ **bacteriopexic** ◇ **1 bakterilenus** aa. **2 bakterilenadel** aa. 1 En araez da bakañ bakteri. 2 A-zave d'ar bakterilenañ.

bactériophages, **phages** ◇ **bacteriophages**, **phages** ◇ **bakteriofag** s., **fag** s. Viruzoù o c'hoari roll ur gwezher pore e-keñver ar bakteri, o tec'h an al loezañ anezho; gwikefre o gwered eo ensinklañ o genom e-barzh kromozom ar bakteri; piaouel int d'ur spesad bakteri pe d'ur skod zoken.

bactériophages tempérés, phages tempérés ◇ ◇ **bakteriofag kerreizh, fag kerreizh** Rumm bakteriofag (dezho ur genom RNA) o kemer stumm ar *profag* evit mont gougevan ouzh kromozom ar bakteri ha devoudañ enno ur pore henek (sl. *prophages*).

bactériophages virulents, phages virulents ◇ ◇ **bakteriofag anialek, fag anialek** Rumm bakteriofag (dezho ur genom DNA) a zistruj ar bakteri dre nerii enno.

bactériophagie ◇ **bacteriophagia** ◇ **bakterofagiñ** Distrujañ ar bakteri dre ar bakteriofag; sellet e vez ar bakteriofagiñ evel ur pore o tizhout ar bakteri.

bactériostase ◇ **bacteriostasis** ◇ **bakteriharziñ** Skoilhañ ouzh neridigezh ar bakteri.

bactériostatique ◇ **bacteriostatic** ◇ **1 bakteriharz** aa. **2 bakteriharzer** g. **-ioù** 1 En araez da werediñ war ar bakteri dre c'horrekaat pe dre astaliñ o neridigezh hep o distrujañ. 2 Danvezenn vakteriharz.

bactériotoxine ◇ **bacteriotoxin** ◇ **bakteriotoksin** g. Toksin a orin bakteriel.

bactériotrope ◇ **bacteriotropic** ◇ **bakterigerc'h** aa. A-zivout an danvezennoù o lenañ ent hanbarek ouzh ar bakteri.

bactériurie ◇ **bacteriuria** ◇ **1 troazhvakteriegezh** b. **2 troazhvec'h** aa. **bakteri** 1 Bezañs garvevion en troazh da ampoent an dioulañ. 2 Niver ar bakteri dre unanenn ec'honad troazh.

bactériurie significative ◇ **significant bacteriuria** ◇ **troazhvec'h bakteri arouezek** Meizad darbennet gant aozerion 'zo : azonon e ve an droazhvakteriegezh d'ur poreadur er forzhioù troazhañ pa savfe an troazhvec'h bakteri dreist ur gwehin lavaret (10⁵ hadenn dre mL) da geñver an dioulañ.

bagassose ◇ **bagassosis** ◇ **bagasoz** g. Skeventanaez hangael diwar zewentañ un antigen bevel bezant er metoù ploueel — en orin, e dilerc'hiou edañvek louedet ar c'horz sukr (Gl. *bagasse*) en Antilhez — hag er metoù greantel (oberierezh paper, blozkuzennoù, panelloù disfuiñ).

bague ◇ **band** ◇ **envez** g. Korzenn vetal ragoberiet pe aozet diwar c'houlenn da vont klenk ouzh gouzoug un dant.

bague

- *cellule en bague (à chaton)* kellig bizoù lagad.

bague de couronne ◇ **crow band** ◇ **envez kurun** Kentañ lankad aozidigezh ur gurun glenk, e amkan enderc'hel talbenn keharzel an dant.

bague de cuivre ◇ **copper ring** ◇ **gwalenn** b. **gouvev** Gwalenn a reer ganti da gemer louc'had un dant.

bague d'ancrage ◇ **anchor band** ◇ **envez eoriañ** Envez siellet ouzh un dant o talvouet da Aanlenañ ur steudell denteunañ.

baign-

- *cavité remplie de liquide dans laquelle baigne l'embryon* kavenn leun gant ul liñvenn o c'hronnañ ar rizhell.

baignoire en trèfle ◇ **Hubbard tank** ◇ **kibell** b. **drifoull** Beol vetal e stumm un dreflezenn arveret en dourgurañ, oc'h aesaat d'an addiorreer e labour ha d'ar gouziviad ar fiñvoù pellaat gant e bevar ezel.

bain ◇ **bath** ◇ **kouronkañ, kouronk** g., **kibellañ** Soubañ an holl pe ul lod eus ar c'horf en ul liñvenn pe ur sonnenn (fank, traezh, h.a.); astenn a reer an termen d'an ardizhañ ouzh ar skinadoù luc'h.

bain alternant ◇ **contrast bath** ◇ **kouronk pebeilat, kouronk dargemmus** Kouronk yen ha tomm tro ha tro, gantañ ur gwered kentraouiñ.

bain carbo-gazeux ◇ **carbon dioxide bath** ◇ **kouronk dioksidenn garbon, kouronk dioksikarbonnek, karbogouronk** g. Kouronk e-barzh dour bec'hiet gant dioksidenn garbon (sl. *aérobain*).

bain hydrogalvanique ◇ **hydrogalvanic bath** ◇ **kouronk hidrogalvanek** Kouronk e-barzh dour ma tremen ur red tredan untu a read izel.

baïonnette

- *bougie à extrémité droite ou en baïonnette* stilh e veg eeun pe daskamm.

baïsser

- *la diurèse ne baisse pas* ne leia ket an troazhvorc'hañ.

balancé ◇ **swinging** ◇ **brañsellad** g. Fiñv momeder gant un ezel dalc'het izelañ gwellañ argrezadur diarvenn e gigennoù war-benn gwellaat oueskted ha heled e genvelloù.

balancement respiratoire du médiastin ◇ **ediastinal flutter** ◇ **brañsell** g. **ar poullkreiz (gant an analañ)** Diskas ar poullkreiz war-du ar skeventenn yac'h da geñver an ec'hanalañ ha war-du ar skeventenn glañv da geñver an enalanañ, anadenn e dianlen an *trapediñ* dre benn ur skoilh (steviadur bronkez pe bruskaezhad) o tevoudañ ur c'hemm gwask etre an div skeventenn (sl. *trappage*).

balanite ◇ **balanitis** ◇ **mezennfo** g. Tanijenn lemm pe henek glaourgenn ar vezenn.

balanoposthite ◇ **balanoposthitis** ◇ **mezennbeskennfo** g. Tanijenn lemm pe goulemm ar vezenn hag ar veskenn.

balantidiase, balantidiose ◇ **balantidiasis** ◇ **balantidiáz** g. Erzerc'hadoù kleñvedel (en o zouez an darc'hoal henek) diwar an arvevadezh ouzh pervez mab den eus ur ouennad infuzor peritrik.

balbisme, bégaïement idiopathique ◇ **idiopathic stammering** ◇ **gagerezh g. hennadek** Gagerezh dianav an arbenn anezhañ (sl. *bégaïement*).

Balint : syndrome de ~, syndrome d'errance du regard ◇ **Balint's syndrome** ◇ **azoniad g. Balint, azoniad kantren ar sell** Strafulih e durc'haat diarzoug ar sell na c'hell ket erlanañ un ergorenn war fiñv endra chom bonan an durc'haat diarvenn; a-geñver emañ hevelep azoniad gant anafoù en div dolbezenn gitem; kevret gantañ e vez alies distresadoù a 'r gwelvaez, a-wechoù gwelandaouad ha digenurzh loc'hadel.

balliste lésionnelle ◇ ◇ **bannouriez b. anafel** Studi monedigezh ar saezheloù hag an anafoù a zevoudont er bevedeg.

ballisme ◇ **ballismus** ◇ **ballegezh b.** Fiñvoù dizurzh e dianlen un anaf er gronn endan-derc'hvel (sl. *biballisme, hémiballisme*).

ballistocardiogramme, ballistogramme ◇ **ballistocardiogram** ◇ **kalondevannwevad g., devannwevad g., ballistokardiogramm g., ballistogramm g.** Krommenn treset gant ar c'halondevannwezer.

ballistocardiographe, ballistographe ◇ **ballistocardiographe** ◇ **kalondevannwezer g. -ioù, devannwezer g. -ioù, ballistokardiograf g. -où** Ardivink kalondevannwezañ.

ballistocardiographie, ballistographie ◇ **ballistocardiography** ◇ **kalondevannwezañ, devannwezañ** Lerc'hwezañ dilec'h-adoù (heled, tizh, c'hwimm) ar c'horf a-bezh dec'hanet gant an nerzhoù devannañ diwar argrezadoù ar galon (hentenn dilezet hiziv).

ballon-

• *dégénérescence ballonisante* dic'henezhadur gloevennus • *deux ballonnets gonflables à l'air ou à l'eau* daou bellan aer- pe fourhevolc'h.

ballonisation apicale transitoire du ventricule gauche, syndrome du takotsubo ◇ **transient left ventricular apical ballooning** ◇ **gloevennad g. dibad kern ar c'hofig kleiz, azoniad g. an tako-tsubo** Darvoud dibaot, deskriet e 1990 gant aozerion japanat, heñvel ouzh un azoniad kurunel lemm, o c'hoarvezout da heul ur stres gant ar maouezed goude 60 vloaz; ar c'hofigluññ a ziskouez anfiñv parzhioù kreiz ha kern ar c'hofig hag usfiñv an diaz — alese an anvad japanek, an *tako-tsubo* o vezañ ul lestr kofek arveret da besketa ar morgizhier; anaez eiltroüs hep arlenad.

ballonnement, météorisme ◇ **ballooning, meteorism** ◇ **stambouc'h g., gloen b.** Anglevad displijus koeñvadur an argreuzenn pe ar c'hof; aozerion 'zo a laka kemm etre ar *stambouc'h*, santadur anglevet gant ar gouziviad, hag ar *c'hoen*, anadenn ar reñver aezhenn er ganol vezhur.

ballonnement de la valve mitrale, ballonisation de la valve mitrale, syndrome de Barlow, syndrome prolapsus de la valve mitrale-clic, syndrome de la valve flasque ◇ **balloon mitral valve** ◇ **bolzennad g. an trapig mintrek, azoniad g. Barlow, azoniad izad mintrek-klik, azoniad an trapig mintrek laosk** Direizh arc'hwelel an trapig mintrek : da geñver ar sistol e vez un pe an div sac'hell anezhañ o volzenañ hag o valirañ e-barzh ar c'hentez kleiz; selaouennet e vez ouzh kern ar galon, e kreiz pe e dibenn ar sistolvezh, ur stlak berr (klik) heuliet alies gant ur sourr o testiñ ur skorted vintrek leiek; ezreolder paot o tizhout ar maouezed yaouank, diouzañvet mat peurvuiañ.

ballottement du pied : signe du ~ ◇ **foot ballottement** ◇ **arouez bolodiñ an troad** Rikladur ezreol war dreuz a c'haller goulankañ d'an troad, erzerc'had un trec'houllo e kenvell an ufern diwar un torr, un disvellad pe ur weadenn.

ballottement fœtal ◇ **fetal ballottement** ◇ **bolodiñ ar grouell** Merzhidigezh un astos pa deutaer ar grozh vec'hiek dre zerc'hel ar c'hof etre an daouarn : ar grouell bountet gant an eil dom a zeu da stekiñ ouzh egile.

balnéation ◇ **balneation** ◇ **kouronkañ, kouronkadur g.** Soubañ yac'hadel ar c'horf pell pe belloc'h amzer en ur metoù liñvel, sonnel, skinel, aezhel (estreget an aergelc'h); komz a reer eus *dourgouronkañ, fankkouronkañ, dreistmoukkouronkañ*, h.a. (sl. *bain*).

balnéothérapie ◇ **balneotherapy** ◇ **kouronkkurañ** Diskiblezh yac'hadel oc'h arverañ ar c'houronkañ; komz a reer eus *morgurañ, havgurañ, heolgurañ*, h.a.

balsamique ◇ **balsamic** ◇ **balzamek aa.** A zo ur balzam ennañ; frondek, arouglevek.

bambou

• *cheveux en bambou* blev bambouz, blev koumbantek.

bandage, bande, pansement ◇ **bandage, dressing** ◇ **bandenn b., lienenn b., lienad g., anro g., anroad g.** Dafar mezegel arloet evit goleiñ ur gouli ha derc'hel warnañ ul lia, amwaskañ ur parzh korf, diloc'hekaat un torratur, un disvellad pe ur weadenn.

bandage herniaire ◇ **truss** ◇ **gouriz g. avelenn** Steudell evit derc'hel direet un avelenn, pe reut gant ur bolod arloet ouzh ode an avelenn (barlennogadoù), pe heuz (toullgofadoù, begelogadoù).

bande

• *bande cyanotique située parallèlement au bord libre de l'angle* gwrimenn dulaz loet kenstur da ribl rez an ivin • *bande d'absorption* bann lugañ • *bandelette diagonale* stirad treuzveg • *bandelette fibreuse* lurell stirek • *bandelette longitudinale postérieure* hordenn a-hed kreizel • *identifier les raies ou les bandes caractéristiques d'un élément* hennadiñ ar regoù pe ar bannoù naouus d'un elfenn.

bande passante ◇ **passband** ◇ **1 2 bann** g. **drafet 3 draf** g. 1 Teskad talmoù an arhentoù en ec'hank ur ristenn vuzuliañ gavaelet o heled etre $1/2^{-2}$ hag 1 wech an heled uc'hek treuzkasat. 2 Teskad ar skogoù gavaelet o heled etre daou hin, izelañ (gwehin) hag uhelañ (gourin); an ardivinkoù arveret da rummañ ar skogoù hervez an despižadur-mañ a anver *diuzerioù heled*. 3 Naouuster un amplaer, anezhañ teskad an talmoù amplaet o heled gantañ; spizet e vez an draf dre ur gwehin hag ur gourin.

1 2 Bandl : **anneau de ~ 2 anneau de rétraction utérine** ◇ **1 Bandl's ring 2 Bandl's pathologic retraction ring** ◇ **1 gwalcenn b. Bandl 2 gwalcenn gul ar grozh** 1 Bevenn grec'h kanol gouzoug ar grozh, o kemer stumm ur ribl balirek da seizhvet miz ar vrazezded. 2 Darvoud o c'hoarvezout e-kerz ar gwentloù, anezhañ ur skoilh ouzh diskenn penn ar grouell goude digoridigezh ar vi, gwalcenn Bandl o vont d'ur strishaenn, lec'hiet peurliesañ a-geñver gant gouzoug ar grouell, etre korf ar grozh dargrezet hag al lodenn izelañ arhedet.

banque ◇ **bank** ◇ **bank** g. El lavar mezegel, aozadur kadaviñ (boniañ ha mirout) danvezioù a orin denel : kornsae, gwad, askorn, sper, kroc'henn, h.a.

Banti : **syndrome de ~** ◇ **Banti's syndrome** ◇ **azoniad g. Banti** Anez o tizhout ar re yaouank, da azonoù dezhañ usvent ar felc'h, amwad argreskus, kirroz an avu ha torliñv.

baranesthésie ◇ **baranaesthesia** ◇ **1 gwaskaneraez g. 2 gwaskdieraезиñ** 1 Ezvezañs pe koll ar gwaskeraезиñ. 2 Lemel ar gwaskeraезиñ.

barbitémie ◇ ◇ **gwadvec'h g. bartitureier, barbiturwadvec'h g.** Feur barbitureier er gwad.

barbiturique ◇ **barbiturate** ◇ **barbitureg g. -eier** Deverad eus an drenkenn varbiturek pe malonilurea; erskrivet e vez ar barbitureier evel hezerioù, hunwezherioù, enepkrideier ha dieraезиоù; kemm a lakaer etre ar *barbitureier kevall* o werediñ kerkent hag ensinklet hag ezvevennet dindan un hanter eurvezh, hag ar *barbitureier divall*, gorrek da werediñ hag ezvevennet goude ouzhpenn 24 h.

barbiturisme ◇ **barbiturism** ◇ **barbituregezh b.** Pistriadur gant ar barbitureier; deraouiñ a ra ar varbituregezh lemm (argeziad emlazhañ) dre ur prantad mezded ha dedreiñ en ur c'homa war zonnaat gant strafuilhoù ar c'hele'hstrishaerioù, istead analañ, stertor, iswrester ha falladur kalon; ur varbituregezh goulemm (mezegadurioù) a zec'han anadennoù hollek, terzhienn, goulitñ, kroc'henn-anezioù.

baresthésie ◇ **baraesthesia** ◇ **gwaskeraезиñ** Kizidigezh ouzh an argemmoù gwask; loet emañ fraouvaou ar gwaskeraезиñ er gwiadoù don, kigennoù, stirenoù, eskern, kenvelloù.

barodontalgie, aérodontalgie ◇ **barodontalgia** ◇ **gwaskdantost b., aerzantost b.** Laur dent diwar argemm an aerwask.

barognosie ◇ **barognosis** ◇ **gwaskdenaout** Merzhout an argemmoù gwask.

barorécepteur ◇ **baroreceptor** ◇ **gwaskfraouva g.** Organ pe dachad korf fraouaet ent hanbarek gant an argemmoù gwask; ent dibarek, ar gwaskfraouvaou loet e god ar garotidenn hag e gwareg an aortenn o deus perzh en arouleviañ ar gwask talmerel dre o c'hizidigezh ouzh argemmoù stumm speur an dalmerenn dindan wask ar gwad.

barosensible ◇ **pressoreceptive** ◇ **gwaskeraезus aa., gwaskfraouidik aa.** A-zivout un organ pe un tachad korf, kizidik ouzh an argemmoù gwask.

barothérapie ◇ **pressure-therapy** ◇ **gwaskkurañ** Mezegadur treloc'hel ouzh strafuilhoù amred 'zo en izili traoñ (skortedoù talmerel) diwar-bouez un amwaskañ a-gorvez; er gwaskkurañ e renker ivez prederiadur ar goulitñ limfel dre an amgovlañ das-tennek.

barotraumatisme ◇ **barotrauma** ◇ **gwaskdaraez g.** Teskad an anafoù er skouarn grenn (taboulin, korzenn glevedel) da heul argemmoù gwask trumm etre ar metoù diavaez ha kavenn an daboulin.

barrage ◇ **blocking** ◇ **kaelad g.** Astal trumm an niñvañ (prezeg hag ober diarzoug ha diarvenn) gant ar skizofrened.

barres parallèles ◇ **parallel bars** ◇ **barrennoù kenstur** 1 Stignadell sport anezhi div dreuzellenn a-zremm kenstur ha reoliadus o sav hag o skar. 2 Ardivink bale frammet heñvel arveret evit an addiorren.

barre

- *douleur abdominale à type de crampe ou de barre* laur kof e rezh ur c'hlap pe ur sparl.

barrière alvéolo-capillaire ◇ **alveolo-capillar barrier** ◇ **kael b. logigoùkorrwazhied** Er skevent, teskad ar gwiadoù etre aer al logigoù ha gwad ar c'horrwazhied : speur al logigoù, speur ar c'horrwazhied, ar gwiad entremezel, plasma ar gwad.

bartholinite ◇ **bartholinitis** ◇ **bartolino g.** Tanijenn gwagrenn vras rakkambur ar gouin, anvet c'hoazh gwagrenn Bartholin.

Bartter : **syndrome de ~, hypokaliémie chronique familiale avec hyperkaliurie** ◇ **Bartter's syndrome** ◇ **azoniad Bartter, kaliomwadisvec'h henek familhel gant kaliomdroazhusvec'h** Anez erzerc'h adalek ar vugeliezh dre an ustroazh, ar goursec'hed, ar goulerc'h kreskiñ, usvec'h an aldosteron diwar usvorc'h an angiotensin da heul uswe kentael ar benvegadoù nes-bloueig, an alkaloz hag an dedaniezh; klañvadur arwashaus, marvus dre zigempouez doureveionel pe skorted al lounezhi.

baryte ◇ **baryum sulfate** ◇ **barit g.** Sulfat bariom en arc'hoal arveret evel aozad dargemm (danvezenn demer) evit skinluniñ ar ganol vezhur.

barytose ◇ **barytosis** ◇ **baritoz g.** Analeuflegezh vichere diwar zewentañ uloc'h sulfat bariom.

bas débit : **syndrome du ~** ◇ **low output syndrome** ◇ **azoniad** g. **an iskas** Bleuz kalonien da heul ur gwezh surjaniel war ar galon, naouus dre anefedusted argrezadoù ar c'hahe kalon hag ar gwazhiedstrishaat dianlen o tevoudañ ul leiadur eus ar c'has gwad, an iswask talmerel hag an uswask gwazhiennel a-greiz.

base ◇ **base** ◇ **1 bazenn** b. **-où 2 diaz** g. **-où 3 bonhed** g. **-où 4 bon** g. **-ioù** 1 (Kimiezh) danvezenn en araez da zegerc'hañ proton ha da zilaoskiñ ion OH⁻; kediañ a ra gant an trenkennoù evit dec'han halioù. 2 (Korfadurezh) parzh ledanañ pe parzh traoñ un organ, sk. : *diaz ar galon*, *diaz ar c'hlopenn*. 3 (Hiloziezh) skar etre talennoù an daouadoù bazennoù purek ha pirimidek oc'h eren an daou arrevell troellennek DNA; par eo da 0,34 nm; ar gemalenn 1 000 daouad bazennoù (*kilobonhed*, *kb*) zo 340 nm. 4 (Liaerezh) kentaozad pennañ ul lia.

base excess ◇ **base excess** ◇ **revazegezh** b. Usvec'h bazennoù er gwad, dewerzhet e mmol/l; ar bec'h reol zo par da 0 ± 2 mmol/l.

bases puriques ◇ **purine bases** ◇ **bazennoù purek** Stroll danvezennoù nitrogeken a-gedran en nukleotid hag en trenkennoù nukleek; o luniad a c'hoarvez eus ur c'horvell pirimidin hag ur c'horvell imidazol kempeg; an holl anezho, nemet an *adenin* (6-aminopurin), zo hidrokspirinnoù (*guanin*, *hipoksantin*, *ksantin*); termen olañ eznevid ar bazennoù purek eo an drenkenn urek.

bases pyrimidiques ◇ **pyrimidine bases** ◇ **bazennoù pirimidek** Stroll danvezennoù nitrogeken a-gedran en nukleotid hag en trenkennoù nukleek; o luniad a c'hoarvez eus ur c'horvell c'hwec'hkornek ennañ peder atomeken karbon ha div nitrogen; ar pennañ bazennoù pirimidek eo ar *c'hitozin*, an *timin* (bezant en DNA) hag an *urakil* (bezant en RNA).

bases xanthiques ◇ **xanthine bases** ◇ **bazennoù ksantek** Stroll danvezennoù deveret eus ar ksantin, anezho peurgetket ar *c'hafain* (trimetilksantin), an *teofillin* (1-3 dimetilksantin), an daou eztennet eus ar c'haf, an *teobromin* (3-7 dimetilksantin), eztennet eus ar c'hakao.

bases tampons du plasma ◇ **buffer bases** ◇ **bazennoù skurzer (ar plasma)** Sammad anion ar plasma gwad a zo o bec'h e dalc'h argemmoù bec'h an ion H⁺ er gwad, o roll enta skurziñ argemmoù ar pH; ar pennañ skurzerioù zo ar bikarbonatoù, ar proteinatoù hag an hemoglobinatoù.

Basedow : **maladie de ~**, **goitre exophtalmique** ◇ **Grave's disease**, **Basedow's disease** ◇ **kleñved Basedow**, **pennsac'h** g. **-où bourbellus** Kleñved o tizhout ar maouezed dreist holl, naouus a) ent neuziadurel, dre uswe strewek epitelienn ar skoedenn, o tec'han skoedusvorc'h; b) ent klinikel, usvent ar skoedenn, kalonustead, treutadur, goursec'hed, kaherasikted ha krenerezh, bourbellegezh daoudu; diazezet eo deznaou ar c'hleñved war dezventañ an hormon skoedel er gwad ha delenadur an iod skinoberiek gant ar skoedenn; hiziv e seller kleñved Basedow evel ur c'hleñved unanhangaeel.

basedowien ◇ **basedowian** ◇ **1 bazdovek** aa. **2 bazdoveg** g. **-eion 3 bazdovel** aa. 1 Gant kleñved Basedow. 2 Gouziviad kleñved Basedow. 3 A-zave da gleñved Basedow.

basedowisme aigu, **crise thyrotoxique**, **hyperthyroïdisme aigu** ◇ **thyroid crisis** ◇ **bazdovegezh** b. **lemm**, **gwaskad** g. **skoedenn**, **skoedusvorc'hegezh** b. **lemm** Gwaskad gourlemm grevus diwar ur frapad gwadusvec'h tiroksin o c'hoarvezout e-kerz kleñved Basedow da geñver un oberatadenn, ur pore pe ur skoedennezvenañ, naouus dre remortad an holl azonou hag un angremm o tedreñ, en ezvezañs mezegadur, betek ar fallezh, ar c'homa hag ar marv (sl. *parabasedowien* : *syndrome* ~).

basiotribe ◇ **basiotribe** ◇ **diazfriker** g. **-ioù** Ardivink da ren an diazfrikañ.

basiotripsie ◇ **basiotripsy** ◇ **diazfrikañ** Oberatadenn war ar grouell varv *in utero*, anezhi breviñ diaz ar c'hlopenn war-benn aesaat an ezvoutañ.

basocellulaire ◇ **basal cell** ◇ **diazkelligel** aa. A-zave da haen diaz an ezkroc'hen (sl. *épithélioma*).

basophile ◇ **basophilic** ◇ **1 bazennlen** aa. **2 bazofil** aa. 1 Lenidik ouzh ar bazennoù. 2 A-zivout elfennoù luniek ar gwiadou bevel lenidik ouzh al livuzennoù bazek.

basophile : **polynucléaires ~s** ◇ **basophils** ◇ **granulokit** s. **bazofil** Seurtad granulokit (leukokit lieshoskek o c'hraoñell) a zo greunennadoù bazennlen bras ha demer en o c'hitoplasm.

basophilie ◇ **basiphilia** ◇ **1 bazennlen** g. **2 bazofiliezh** b. 1 Lenidigezh ouzh ar bazennoù. 2 Bezañ bazofil.

bas-
• acide aminé basique amindrenkenn vazek • *basale, membrane basale* diazkennenn • *colorants basiques* livuzennoù bazek • *corpuscules basaux des racines ciliaires* diazkorfigoù ar gwrizioù blevan • *détecteur basé sur la mesure de la quantité d'électricité* dinoer dre vuzuliañ ar c'hementad tredan • *dotés de propriétés basiques* dezho perzhioù bazek • *lame basale des capillaires* lavnenn diaz ar c'horrwazhied • *le bas œsophage* diadrañ an treizher • *matériau à base d'acide phosphorique et d'oxyde de zinc* danvez aozet diwar-bouez trenkenn fosforek hag oksidenn zink • *méthode basée sur une théorie* hentenn soliet war un arlakadenn • *pommade à base de cire et d'huile* ogan da von ennañ ur meskad koar hag eoul • *servant de base pour des préparations cosmétologiques* danvezet evel kentaozad en angevezhioù gwezeladel • *triplet de bases de l'acide ribonucléique* triad bazennoù eus an drenkenn ribonukleek • *voie postérobasale du faisceau de His* forzh diazel adreñv hordenn His.

bassin ◇ **1 pelvis 2 bedpan** ◇ **1 lestr** g. **2 pladell** b. 1 Gouriz eskern e diadrañ ar c'hef, o c'hoarvezout eus an eskern kroazell ha belost en adreñv, eus an daou askorn a 'l lez en daou gostez hag en araog; div lodenn a ya d'ober kavenn al lestr : al *lestr bras* (PNA *pelvis major*) e-krec'h, al *lestr bihan* (PNA *pelvis minor*), etrezo an *digor krec'h* (PNA *apertura superior*). 2 Endalc'her arblat a vounter dindan ar c'hlañavour en e wele evit dastum e oulennoù.

bassin achondroplasique ◇ ◇ **lestr migornangwek** Lestr arstrizh diouzh e holl ventoù, en e zigor krec'h dreist holl.

bassin annelé ◇ ◇ **lestr enveziek** Lestr lec'hek arstrizh en e zigor krec'h hepken.

bassin aplati ◇ ◇ **lestr arblat** Lestr ezreol, isvent a-saezh, usvent a-dreuz.

bassin cyphotique, bassin en entonnoir ◇ **kyphotic pelvis** ◇ **lestr rakwariek, lestr e stumm founilh** Lestr eilpennet war dreñv, ledanoc'h en e barzh krec'h (lestr bras ha digor krec'h), strishoc'h en e barzh traoñ.

bassin justo-minor ◇ **pelvis justo minor** ◇ **lestr arstrizh ingal, lestr justo minor** Lestr arstrizh a-genfeur en e holl dreuzkizoù, a stumm reol met bihanoc'h.

bassin lordotique, bassin en éteignoir ◇ **lordotic pelvis** ◇ **lestr drekwariiek, lestr e stumm mougerig** Lestr eilpennet war raok da heul disvellad daoudou al lez; strishoc'h eo al lestr bras dre ma 'z eo denesaet an div askell glun, ledanoc'h an digor krec'h hag en arfrank an digor traoñ.

bassin ostéomalacique ◇ **osteomalacic pelvis** ◇ **lestr askornvlodadek** Lestr distummet bras dre benn diveineladur ha boukadur an eskern.

bassin plat ◇ **flat pelvis** ◇ **lestr plat** Seurtad paot a lestr reol leiaet e vent a-saezh, muiaet e vent a-dreuz.

bassin rachitique ◇ **rachitic pelvis** ◇ **lestr lec'hek** Lestr isteñvek, strishoc'h e meur a zoare, a-dreuz, a-saezh pe a bep tu.

bassin rond ◇ **round pelvis** ◇ **lestr ront** Seurtad dibaot a lestr reol, par e ventoù a-saezh hag a-dreuz.

bassin scoliotique ◇ **scoliotic pelvis** ◇ **lestr treuzwariiek** Lestr digemparzhiek e stumm ur vigelc'h beskellek, ennañ gwariet a-gleiz penntir an askorn kroazell, gwariet a-zehou jundat ar c'haezour ha distummet a-c'hin an digor krec'h hag an digor traoñ.

bassin triangulaire ◇ **triangular pelvis** ◇ **lestr tric'hornek** Seurtad dibaot a lestr reol, begek ennañ gwarenn araok an digor krec'h hag arblat ar warenn adreñv.

bassin vicié ◇ **abnormal pelvis** ◇ **lestr ezreol** Anvad rumm evit al lestroù kammstummet pe gammstouet, alese ganto skoilh pe skoilh ouzh ar gwilioudiñ.

bassin de vie ◇ ◇ **kantad g. yec'hedel** Tiriad ledanoc'h eget ar *gennad yec'hedel* (Gl. *secteur sanitaire*), ma vez bastet d'an darn vuiañ eus ezhommoù yec'hedel ar boblañs gant ar yec'hedioù diazezet ennañ.

bassinnet du rein ◇ **pelvis of the ureter** ◇ **lestr al lounezh** Frankaenn deroù forzh degorzhañ al lounezh o tisoc'h eus kengej ar c'haliroù bras hag o tiferoukañ er san droazh.

bathmotrope ◇ **bathmotropic** ◇ **1 broudwezher aa. 2 broudwezher g. -ioù** 1 A-zave da vroudadusted gwiennoù ur c'haher (ar c'haher kalon peurliesañ). 2 Danvezenn vroudwezher : *brouduswezher* (Gl. *bathmotrope positif*) pa vuia ar vroudadusted, da skouer an digitalin, *brouduswezher* (Gl. *bathmotrope négatif*) pa leia ar vroudadusted (sl. *cardiotonique*).

bâtonnet olfactif ◇ **olfactory receptor ending** ◇ **bleñchenn b. ar c'hwesa** Astennad ar *gellig nervskiantennel c'hwesa* (Gl. *cellule neurosensorielle olfactive*); an dibenn anezhañ, bazhoulek, zo ennañ ar *gellenn c'hwesa* (Gl. *vésicule olfactive*), warni etre 6 ha 12 *blevan c'hwesa* (Gl. *cil olfactif*).

bâtonnet rétinien ◇ **retinal rod** ◇ **kegel b. -ioù al luc'hsae** Kellig nervskiantennel al luc'hsae, enni ar moug, a zo araez ar gweled fotepek; tri farzh dezhi : un azledad diavaez, luc'heraez, ar c'horf, ar penn diabarzh kevaotet gant astennad ar c'helligoù daouvin; bezant eo ar c'hegeliou el luc'hsae a-bezh (120 milion anezho) nemet er vrizhenn (sl. *cellule bipolaire, cellule neurosensorielle, cône rétinien*).

battement ◇ **beating** ◇ **meilhata** Embreg leuñvouriezh o c'hoarvezout eus ur c'hiziata skañv gant an dorn serr (sl. *kinésithérapie, massage*).

battement

- *inégalité de l'amplitude et des intervalles entre les battements cardiaques* dizingalded heled hag entremeziou lammoù ar galon
- *les cils vibratiles assurent par leur battement le déplacement de substances comme le mucus* ar blevanoù kreniat, dre houlenañ, a laka danvezennoù evel ar glaour da zilec'hiañ.

baume ◇ **balsam** ◇ **balzam g.** 1 Rousin struzhel frondek. 2 Angevezh apotikel frondek arloet dre eliañ.

baume de Tolu ◇ **Tolu balsam** ◇ **balzam Tolu** Danvezenn graostañ douhennet eus ur seurtad gwez, *Myroxylon toluiferum*.

Bazy : **maladie de ~, hydronéphrose congénitale intermittente** ◇ ◇ **kleñved Bazy** Seurtad lounezhfoeñv diwar volc'h-adur ganedigel al lestr hag ar c'haliroù da heul angwe ar gahereg levn anezho.

BCG ◇ **BCG** ◇ **BCG g.** (Tallizherennoù (*bazhell*) *bestlet Calmette-Guérin*, 1921) bazhell a 'n dorzhellegezh eus ur skod *Mycobacterium tuberculosis* a orin buel aet ananial en ur virot he antigenegezh hag he hangaeüsted da heul un 230 azhadad war vetoù bestlet, o talvout d'ar vaksinañ eneptorzhelliek, diounezet gwechall dre ar genoù, hiziv diwar-bouez araskadoù kroc'hen pe ensinkladoù entonennel; gwezhiañ a ra ar BCG dre gentraouiñ an difennoù hangaeel.

BCG-test, test au BCG ◇ **BCG-test** ◇ **erwezh g. ouzh ar BCG, BCGbrouad g.** Erwezh entonennel (*entonennerwezh*, Gl. *intradermoréaction*) pe kroc'henel (*kroc'henerwezh*, Gl. *cutiréaction*) embreget dre ar BCG bev pe lazhet evit dinoñ an allergiezh torzhellek; yaek e ve etre 20 hag 25 % eus an degouezhioù anerwezh ouzh an tuberkulin — komz a reer neuze a allergiezh danduberkulinel; arveret e vez dreist holl da evezhiañ an allergiezh dianvaksinel.

BCG-thérapie ◇ **BCG-therapy** ◇ **BCGgurañ** Danveziñ ar vaksin BCG dre an hentoù dangroc'hen pe entonenn war-benn fraouaat ent spesadel an difennoù hangaeel evit prederiañ kankroù 'zo.

BCR, gène ~ ◇ **BCR gene** ◇ **genenn BCR** (BCR : Sz. *breakpoint cluster region*, Br. *rannbarzh an torrboentou*) genenn loet war vrec'h hir ar c'hromozom 22 a c'hoarvez ganti bezañ treuzempret el leukemiezh vieloidel henek.

béance ◇ **apertognathia, open bite** ◇ **amgeharz g.** Bezañs un esaouenn ezreol etre talbennoù keharzel ar c'hildent (*amgeharz kildentel*, Gl. *b. molaire*) pe ar rakdent (*amgeharz rakdentel*, Gl. *b. incisive*).

béance isthmique, béance du col utérin ◇ **incompetent cervix** ◇ **dislev g. ar strizh, dislev gouzoug ar grozh** Kamm-neuziad, skorted arc'hwele gouzoug ar grozh a c'haller tremen ur stilh 1 cm treuzkiz dre ar gwask diabarzh anezhañ, a-wechoù ganedigel, peurliesañ e dianlen un daraez gwilioudel, unan eus arbennoù ar sioc'haniñ emdarzh arreat.

bébé bronzé : syndrome du ~ ◇ **bronze baby syndrome** ◇ **azoniad ar babig g. -ed arem** Liv an arem oc'h anadiñ war groc'hen, gwadveiz ha troazh an nevezc'hanidi lakaet en ardizh ar skinoù dreistmouk da geñver prederiadur ur gwadusvec'h bilirubin digraf, o steuziañ pa boueuzer al luc'hgurañ.

bébé collodion, érythrodermie ichtyosiforme, hyper-kératose ichtyosiforme ◇ **congenital ichtyosiform erythroderma, sealy baby** ◇ **babig skantek, babig kollodion, hiperkeratoz g. iktiozvanek** Furm dibaot eus gourc'hennadur lavnek an nevezc'hanidi, diwar an trebad hogos klok eus ar gwiskad epitrikel (a zistag ent reol e-kerz 7t mizvezh an enkrozhvezh) o skarrañ en eurvezhioù goude ar c'hanedigezh hag o tispegañ a blakennoù bras.

bec-de-lièvre ◇ **harelip, cleft lip** ◇ **boulc'h g. -où** Anvad rumm kammneuziadoù ar fas diwar diouer soutadur an novoù, anated al linenn soutadur pe trebad ur faout; peurliesañ e vez e rezh ur skarr er weuz krec'h (*mizlid ar weuz*, Gl. *cheilodysraphie*); a-wechoù e tizh ar garvan e rezh ur skarr er baleg logigaouek hag er stavn askornek (*mizlid ar weuz hag ar stavn*, Gl. *cheilopalato-dysraphie*).

bec-de-perroquet ◇ **rachidian osteophyte, lipping** ◇ **pigos g. -où peroked, mousklenn b.** Anvad boutin askorndeñvennoù ar mellennoù, dezho ur stumm kromm ha begek.

béchiq, antitussif, tussiplégique ◇ **bechic** ◇ **1 eneppez aa. 2 eneppez g. -eier** 1 Gwezhus ouzh ar paz. 2 Lia eneppez.

Beck : triade de Claude ~ ◇ **Beck's triade** ◇ **triad g. Claude Beck** Kevreted an uswask gwazhiennel, an iswask talmerel hag ur poulz bihan ha reizh azonus d'ur fennad amgalonenn (kouchadur).

bégaïement ◇ **stammering** ◇ **gagerezh g.** Strafuilh spanaennek en distilhañ, anezhañ ar bec'h o kemalañ riel ha fraezh ar mouezhiadoù, kement-se hep ma ve direizh er benvegad mouezhparañ; lies furm a zeskriver : ar *gagerezh hennadek* (Gl. *bégaïement idiopathique*) a zeraou er vugeliezh, kevret alies gant strafuilhoù analadel hag arurioù; ar *gagerezh klasel* (Gl. *bégaïement classique*), naouus dre an *daradleñv* (Gl. *palisyllabie*), arreata a-stroñs leñvenn gentañ ar gerioù; ar *gagerezh tantek pe haketerezh* (Gl. *bégaïement tonique*), a zo an dic'halloud da zeluzañ ur bomm e-doug un nebeut eilennoù.

bégue ◇ **stammerer** ◇ **1 gak aa., gager aa. 2 gag g. -ed, gager g. -ion** 1 Gant ar gagerezh. 2 Gouziviad ar gagerezh.

behaviorisme ◇ **behaviourism, behaviorism** ◇ **behavioegezh b.** Doazhadur oc'h intent ar Vredoniezh evel ur skiant ergorel rik, diazezet war studi mab den e termenou a gentrigadoù hag a erwezhiou, a annalc'h hag a zezalc'h; disteurel a ra ar roadennoù dangorel, an emouezañ hag ar c'hantaezañ pergen, evit plediñ hepken gant an amvezhiadoù a vez o reiñ tro d'an hinienn da emazasaat diouzh ar metoù ha da zanken ur rouedad bepred amploc'h a voazioù realañ; arzaelañ a ra an termen "bredkleñved", evit ober anv a "strafuilhoù an emazasaat" prederiadus dre an dizarblegañ; un dedalvezadur eo eus arlakadennoù Pavlov war an damougoù darblegadel hag an neurozioù armod (sl. *réflexe conditionné*).

Behçet : maladie de ~, **syndrome de** ~ ◇ **Behçet syndrome** ◇ **azoniad g. Behçet** Klañvadur ar baotred yaouank stadet e rannbarzh reter diazad ar Mor Kreiz hag e Japan, anezhañ kevreted tri stroll azonou : afoù genaouel, afoù ganadel, anafoù lagadel (gwazhiedsaefo, tolgennkormsaefo); dedreiñ a ra afrapadoù a-hed ar bloavezhioù; dezhañ erbedadoù grevus : dallentez, rouestlodoù navel marvus; dianav eo an arbenn anezhañ.

Behr : syndrome de ~, **atrophie optique de Behr** ◇ **Behr's syndrome** ◇ **azoniad g. Behr, isteñv g. gweledel Behr** Seurtad isteñv a 'n div nervenn weled, familhel a-wechoù, o teraouiñ er vabaniezh; kevret alies gant ar ferennlug ganedigel, un azoniad pikermennek, an ankedre hag an dilerc'hegezh vred; treuzkaset e vez peurliesañ er mod enkilek.

Bell : signe de ~ ◇ **Bell's phenomenon** ◇ **arouez b. Bell, anadem b. Bell** E seizi trobarzhel an dremm, fiñv krec'hduañ hag eztauañ ar voull lagad pa striv ar gouziviad da serriñ ar valvenn grec'h seizet (fiñv bonan kuzhet gant ar valvenn serret).

Bell-Magendie : loi de ~ ◇ **Bell-Magendie law** ◇ **savelenn b. BellMagendie** Stadadenn o savelañ daouelezh arc'hwelel ar gwrizenioù navel hervez o lec'h eskoriñ eus ar mellkein : loc'hadel e vez gwrizenioù a-dor an nervennoù a-livenn, santadel ar gwrizenioù a-gein.

Bence-Jones : protéine de ~ ◇ **Bence Jones's protein** ◇ **protein BenceJones** Protein bezant e gwad hag e troazh gouziviaded kleñved Kahler ha kleñvedoù all evel gwadvakroglobulinegezh Waldenström, a un luniad gant digorvelloù skañv a rizh k pe l an immunoglobulinou monoklonel.

bénignité ◇ **benignity** ◇ **kuñvded b.** 1 A-zivout un anaez, bezañ kuñv, eleze hep grevusted. 2 En neuzkleñvedouriezh, bezañ ankankrek (sl. *malignité*).

bénin ◇ **benign, benignant, innocent, mild** ◇ **kuñv aa.** 1 A-zivout un anaez, hep grevusted, o parañ frank. 2 En neuzkleñvedouriezh, a-zivout ar yoc'hennou : a) a-veursell, o teñvañ war al lec'h, hevonn, bolc'hennet alies, o tisvountañ ar gwiadoù kefin

hep o aloubiñ; *b*) a-gorrsell, o c'hoarvezout eus gwiadoù a un neuz kelligel hag adeiladel gant ar gwiadoù bonan; *c*) ent dedroadel, o kreskiñ gorrek hep teurel dasseziou, hep adfeilhañ goude an ezvenañ surjaniel klok (sl. *malin*).

bénin

• *petite tumeur bénigne kystique de la paupière développée aux dépens d'une glande de Meibomius* yoc'henn guñv bihan kistek evodet er valvenn diouzh ur wagrenn dars • *tumeur conjonctive bénigne* yoc'henn genglenel kuñv • *variété bénigne d'ostéochondrodysplasie* seurtad kuñv a viwe askorn-migorn.

Benson : maladie de ~, hyalite étoilée ◇ **Benson's disease** ◇ **kleñved Benson, gweregfo g. stergannek** Bezañs er c'horf gwerek a euflennoù war neuñv merzhet gant ar gouziaviad e rezh greun lugernus pe malzennoù erc'h.

Benson : syndrome de ~, atrophie corticale postérieure ◇ **Benson's syndrome** ◇ **azoniad Benson, isteñv g. ar bluskenn adreñv** Dedro argammedek un ezaouiñ amzerel-egorel, un anlenn, un anskriv egorel hag elfennoù all eus an andenaoud gwedeled, gant ur gouziaviad hep azonoù envedi hag emouez ouzh e strafuilhoù; ar skeudennerezh a laka war wel isteñv daoudou ar bluskenn gilpenn-kitem ha kilpenn-ividig.

Bentall : opération de ~ ◇ **Bentall's operation** ◇ **oberatadenn b. Bentall** Amsaviñ an aortenn a-sevel ha gwask an aortenn gant ur gorzenn dakron outi un osod treloc'hel a sac'hell gornloarek; enneget eo evit prederiañ darvolloù aortenn 'zo.

bentonite ◇ **bentonite** ◇ **bentonit g.** Silikat aluminiom dougediet kolloidel, danvezet da amsunañ proteinoù antigenek e prouadoù malzenñ 'zo (sl. *Waalser-Rose*).

benzénisme, benzolisme ◇ **benzolism** ◇ **benzenegezh b., benzolegezh b.** Pistriadur gant ar benzen hag ar c'heveleboù anezhañ : toluen, ksilen, h.a., teskad hidrokarbidennoù bodet dindan an anvad rumm benzolioù; kleñved micherel, anezhañ ur mieloz angweel, grevus alies, marvus a-wechoù.

benzodiazépine, BZP ◇ **benzodiazepine** ◇ **benzodiazepin g. -eier** Anvad genadel danvezennoù heterokiklek, erskrivet evel bredwezherioù (habaskaerioù, huneiadoù, enepkrideier), ganto ivez gweredoù istantus, dizargrezus a-greiz; diounezet d'an etileion e tistavont azonoù an dizonañ hag erzerc'hadoù ar pistriadur lemm.

béquillard : syndrome des ~s ◇ **crutch paralysis** ◇ **azoniad g. ar vranelleion, peluz g. kreuadel** Kreuad henek talmerennoù ar gazel hag ar vrec'h gant ar c'houziaviad o vale war vranelloù kazel.

béquille ◇ **crutch** ◇ **branell b. -où** Harp arc'hwelel d'ar sav ha d'ar bale, anvad rumm an trevnadoù un pe div c'harenn goublet ma pouez warno an dorn hag an arvrec'h pe ar gazel (sl. *canne*).

béquille axillaire ◇ **axillary crutch** ◇ **branell gazel, flac'h b. -où, bazh b. (ls. : bizhier) loaek** Branell un pe daou vann, outi div dreuzellenn diaserzh, ar paobrenn e kreiz da harpañ an dorn, un dibrenn e krec'h da skorañ ar gazel.

béquille d'avant-bras, canne-béquille, canne-accoudoir, canne anglaise, canne canadienne ◇ **forearm crutch, canadian crutch** ◇ **branell arvrec'h, mal b. -où saoz** Branell vetal, outi un dornell a-serzh war he garenn hag, en he fenn krec'h, ur c'havaz da reiñ harp da ziadreñv an arvrec'h.

berge

• *les deux berges d'une plaie* div vriell ur gouli.

beribéri ◇ **beriberi** ◇ **beriberi g.** Kleñved grevus reveziat er Reter Pellañ, e dianlen an emveañ diwar riz divrennet dec'hanus da negez ar vitamin B₁, naouus *ent klinikel* dre strafuilhoù al loc'hañ, ar santout, an amred gvad hag ar borc'hadoù, *ent neuziadurel* dre dizhadur an nervennoù trobarzhel; div furn dezhañ : *a) beriberi sec'h, peluzus pe isteñvus*, naouus dre seizi an izili traoñ; *b) beriberi gleb pe dourgoeñvus* gant skorted kalon darwazhus, gouliñv an izili traoñ ha fennadoù trenaouezek el levrgennoù.

béryllose ◇ **berylliosis** ◇ **berillioz g.** Skeventanaez micherel diwar dewentadur burezh pe eufil berilliom (metal prin danvezet evit oberiañ korzennoù kendreluc'h).

besoin, manque : état de ~ ◇ **state of addiction** ◇ **stad b. ezeved** Stad m'emañ ar c'haezhiad o c'houzañv diwar an diouer dram.

Besredka : méthode de ~, vaccination anti-anaphylactique, tachyphylaxie ◇ **Besredka's method, tachyphylaxis** ◇ **hentenn b. Besredka, vaksinadenn b. enepdarwall, primergost g.** Hentenn a zo he fal hepkoriñ darvoudoù darwalladel ar gwadveizkurañ, anezhi ensinklañ a-rakwez un doead munut (1/10 pe 1/100 mL) meur a wech bep hanter eurvezh kent ensinklañ an doead klok eus ar gwadveiz.

bestialité, zoophilie érotique ◇ **bestiality** ◇ **miloriadezh b., milvreadezh b. orgedel** 1 Gread revel etre un den (gourev pe benev) hag ul loen. 2 Revgerc'husted ouzh al loened, o c'hoarvezout alies gant tud o vevañ en dienez revel (mesaerion, milourion), dilerc'heion don, dibaotoc'h gant troziaded.

bêtabloquant, bêtablogueur, bêta-inhibiteur, adrénolytique bêta, bêtalytique ◇ **beta blocker, beta adrenergic blocking agent** ◇ **1 betadolc'her (β-dolc'her) aa., adrendolc'her aa. beta (β) 2 betadolc'her (βdolc'her) g. -ioù, adrendolc'her g. -ioù beta (β)** 1 O skoilhañ an adreñvuzerioù β dre o ezniñvañ ouzh gwered an adrenalin hag an izoprenalin. 2 Danvezenn vetadolc'her; perzh pennañ ar betadolc'herioù eo leiaat labour ha bevezadur oksigen ar c'haher kalon; an darn vuiañ anezho zo bronkezstrislaus; renkañ a reer ar betadolc'herioù hervez m'o deus *a*) ur gwered *tolc'her digen* (sotalol, tomolol), pe ma piaouont ivez ur perzh *b*) *aroustaler kennenn* (propranolol), pe *c*) *kalonduzel*, β1-dolc'her, eleze o werediñ war ar buzerioù β1 hepken (atenolol, metoprolol), pe *d*) *betafraouaer enien* (pindolol), pe *e*) ouzhpenn unan eus an tri ferzh-mañ diwezhañ (an tri :

akebutolol), pe c'hoazh *f*) perzhioù *alfa*- ha *betadolc* 'her war un dro (labeltolol); arveret e vez ar *betadolc* 'herioù er galonouriezh da brederiañ ar skorted kurunerel hag an uswask talmerel.

bêtalactamines ◇ **betalactam antibiotics** ◇ **betalaktamineier** l. (u. : **betalaktamin** g.) Stroll bevastalerioù a zo boutin etrezo bezañs ar c'horvell betalaktam en o delun; anezho daou gerentiad : ar *penikillineier* hag ar *c'hefalosporineier*, naturel pe damgevanaoz; gwerediñ a reont dre freuzañ speur reut ar bakteri Gram+.

bêtamimétique ◇ **betamimetic** ◇ **1 betageveler** (**β -geveler**) aa., **β -adrenvanek** aa. **2 betageveler** (**β -geveler**) g. -ioù, **β -adrenvaneg** aa. -eier 1 A-zivout danvezennoù kevanaoz o werediñ evel an adrenalin war ar betavuzerioù. 2 Danvezenn vetageveler (pe β -adrenvanek); aozerion 'zo a arver *bêtamimétique* ha *bêtastimulant* evel heñvelsterioù (sl. *bêtastimulant*).

bêtarécepteur, récepteur bêta-adrénergique, bêta-récepteur adrénergique ◇ **betaadrenergic receptor** ◇ **betaadrenvuzer** (**β -adrenvuzer, adrenvuzer β**) g. -ioù, **betavuzer** (**β -vuzer, buzer β**) g. -ioù Luniad molekul loet e dibenn ar gwiennoù simpatek e-barzh an organoù, fraouadus gant an izoprenalin; renkañ a reer ar betavuzerioù hervez gwered o fraouadur war an organoù m'emañ : ar *buzerioù β 1* loet er galon, dezho gweredoù argezuswezher, brouduswezher, talmuswezher, renuswezher; ar *buzerioù β 2* bezant e kaherioù levn ar gwazhied, ar bronkez hag ar grozh m'o devez ur gwered delaoskus; ar *buzerioù β 3* bet dizoloet er bloavezhioù 1990 en adipokit, er c'holon hag er gellenn vestl ma tevoudont ar behinloezañ.

1 O fraouaat ar betavuzerioù. 2 Danvezenn vetafraouaer; ar betafraouaerioù naturel zo an izoprenalin hag an dopamin, dezho ur gwered fraouaat diuzel war an holl vetavuzerioù; an adrenalin, a zo alfafraouaer ivez; an dobutamin, sellet evel ur β 1-fraouaer; ar salbutamol hag ar ritodrin, sellet evel β 2-fraouaerioù (sl. *bêtamimétique*).

bêtathérapie ◇ **betatheryapy** ◇ **betagurañ** Arver yac'hadel ar skinoù b ec'hodet gant ar radiom hag an izotopoù skinoberiek.

bêtatron, accélérateur magnétique d'électrons ◇ **betatron** ◇ **betatron** g. -où, **gwarellc'hwimmer** aa. -ioù **elektron** Mammenn elektron uhelc'hremm (betek 300 MeV) arloet rageun ouzh ar gwiaodoù bev pe danvezet, dre zarstekiñ ouzh ur vukenn vetal, da c'henel skinoù X trebarzhus bras pe c'hoazh skinoù γ .

bête rouge des Antilles, Leptus batatus ◇ **bête rouge, red bug, red mite** ◇ **gwrec'h g.** -ent **ruz Antilhez** Akarian eus kerentiad an Trombidideged, kiriek e Martinik d'un dermatoz heñvel a-walc'h ouzh an hini devoudet en Europa gant an *Trombidium* (gwrec'h Eost pe mederig) (sl. *rouget*).

bezoard ◇ **bezoar** ◇ **bezoar** g. -où 1 Fetisâd a gaver en oaled ar forzhioù koazhañ pe troazhañ gant ar pevarzroadeged, anvet c'hoazh *maen* (maen bestl, maen troazh, maen gravell) ha *grouanenn*. 2 Korf estren kavet e stomok pe e daouzegenn an den, graet gant blev (*trikobezoar*), struzh (*fitobezoar*), had (*diospirobezoar*) pe gant meskadoù eus ar c'horfou-se.

Bezold-Brücke : phénomène de ~ ◇ **Bezold-Brücke phenomenon** ◇ **anadenn b.** **Bezold-Brücke** Daskemm e merzhidigezh al livioù pa vuia ar sked : melenaat a ra ar ruz hag ar gwer arvelen, glasaat al limestra hag ar gwer arc'hlas.

bi-

• *atteinte bilatérale* tizhad daoudu • *bifocal* daousti, daoustiek • *bloc de branche bilatéral* tolc'had barr daoudu • *castration uni-, bilatérale* spazhañ untu, daoudu • *cellules bipolaires* kelligoù daouvleñ • *destruction bilatérale de l'aire striée* distruj daoudu al leur rizennek • *diamètre bi-acromial* treuzkiz divgerskoaz • *hémianopsie bitemporale, binasale* ledangwel ezsko, ensko • *lésion uni-, bilatérale* anaf un-, daoudu • *réssection bilatérale* dazbidañ daoudu • *uterus bicornis, utérus bicorné* krozh daougorn • *uterus biforis* krozh daoudoull • *uterus bilocularis, utérus biloculaire, uterus bipartitus* krozh divlog.

bi-acromial : diamètre ~ ◇ **bi-acromial diameter** ◇ **treuzkiz g.** **divgerskoaz** Regad etre div gern-skoaz ar grouell, par ent reol da 12 cm, o tiren dre choukadur betek 10 pe 9,5 cm pa ziskenn ar grouell e digor krec'h al lestr da geñver ar gwilioud.

bi-ischiatique : diamètre ~ ◇ **bi-ischial diameter** ◇ **treuzkiz daouvoskoaz** Regad treuz digor traoñ al lestr muzuliet etre an daou vos-koazez, par ent reol da 11 cm, bihanoc'h gant al lestr rakwariek.

biballisme, paraballisme, diballisme, ballisme ◇ **ballismus, biballism** ◇ **ballegezh b., biballegezh b.** Strafuilh nervel, anezhañ fiñvoù andiarvenn, trumm, ampl ha taer, bannañ, stlepel, gweañ an izili, a-geñver gant un anaf un- pe daoudu er gronn endanderc'hvel (sl. *ballisme, hémiballisme*).

bibloc, bloc de branche bilatéral ◇ **block, bilateral bundle branch block** ◇ **tolc'had g.** **barr daoudu, daoudolc'h-ad g.** Mire e daou varr an hordenn genterz-kofig (pe hordenn His), anezhañ kevreted un tolc'had barr dehou hag un tolc'had o tizhout un pe an div rann eus ar barr kleiz pe ar c'hef anezhañ.

bicyclette de rééducation ◇ **stationary bicycle** ◇ **jav g.** -ioù **addiorren** Ardivink diasavek o talvout da embreger an izili traoñ : ar gouziviad azezet war un dibr a laka tro en un troadikeller o keflouc'hañ ur wikefre.

bicyclette ergométrique, cyclo-ergomètre ◇ **ergometric bicycle** ◇ **jav gremmventer** Ardivink heñvel ouzh ar jav addiorren, nemet ez eo reoliadus harzder ar wikefre keflouc'het, ur c'honter skourret ouzh houmañ o reiñ an tu da vuzuliañ al labour graet gant ar c'hamblier; talvout a ra da ren prouadoù strivañ evit deznaouiñ ar c'hleñvedoù kalon ha da addiorren ar glañvourion (goude un angwazhiad pe un oberatadenn galon da skouer).

Bielschowsky : phénomène de ~, phénomène des yeux de poupée ◇ **Bielschowsky doll's head phenomenon** ◇ **anadenn b.** **Bielschowsky, anadenn an daoulagad merc'hodenn** Furm glinikel dibarek eus seizi fiñvoù kevreet an daoulagad diouzh un durc'hadur hep ma ve tizhet ar fiñvoù damougek; da skouer, dic'hallus eo d'ar gouziviad treiñ a-ziarvenn e sell war zehou, hogen mar c'hwel trumm e benn war gleiz (ent oberiat pe c'houzañvat), e tro e zaoulagad war zehou — evel ma rafe daoulagad ur verc'hodenn; emañ ar strafuilh e dalc'h un anaf a 'r pont e kefin ar gronn a-rakkamb.

Bielschowsky : signe de ~, test de ~ ◇ **Bielschowsky's test** ◇ **proud** g. **Bielschowsky** Uswariañ ur voull lagad pa stouer ar penn war ar skoaz a-gendu; azon eo da seizi ar gigenn veskellek uhelañ.

Bielschowsky-Lutz-Cogan : syndrome de ~ ◇ **Bielschowsky-Lutz-Cogan syndrome** ◇ **azoniad** g. **Bielschowsky-Lutz-Cogan** Anvad stroll arveret da venegiñ al lagadseizioù etregronnel diaraok ha diadrefñ.

bière : syndrome des buveurs de ~ ◇ **beer drinkers syndrome** ◇ **azoniad an everion vier** Gwadisvec'h natriom e dianlen an dizolc'hiñ devoudet gant euvriñ bier a-fonn; kevret gant usvec'h dour ar c'helligoù ha gant strafuilhoù nerval ha bredel.

Biermer : anémie de ~, maladie de ~, anémie d'Addison, anémie hyperchrome mégaloctytaire, anémie idiopathique, anémie pernicieuse progressive ◇ **Biermer's anaemia**, **pernicious anaemia** ◇ **amwad** g. **yud**, **amwad Biermer**, **amwad uslivel ruzusventel** Sl. *anémie pernicieuse*.

bifidité urétérale ◇ **ureteral bifidity** ◇ **gaolegezh** b. **ar san droazh** Kammneuziad c'hanedigel un- pe daoudu ar san droazh, ganti stumm ur Y, div ganol o vont diouzh daou boent diforc'h eus al lounezh, o kejañ kent difourkañ er c'hwezbigell dre un digor hepken.

bifurcation, bifurquer

• *bifurcation aortique* forc'h an aortenn • *bifurqué* forc'hek, gaolek, skalfek, kavazek • *en amont de la bifurcation du faisceau de His* en argrec'h da gavaz kef an hordenn gentez-kofig.

bigérule ◇ **double gelatin capsule** ◇ **daouvolc'han** g. -où Furm wezher o c'hoarvezout a zaou volc'han, an hini bihanañ o vezañ engronnet e-barzh an hini brasañ, hevelep ma c'haller diounit en ur ser div zanvezenn hep o meskañ.

bigéminisme, bigéminie, rythme couplé ◇ **bigeminy** ◇ **gevelladezh** b. Kemalenn reoliek o c'hoarvezout eus un dreistsistol o tont diouzhtu war lerc'h ur sistol bonan; *pouls gevellat* a reer eus ar pouls keñverek.

bigonadisme ◇ ◇ **daouc'honadegzh** b. Bezañs gwagrennoù revel an div rev gant ur gouziviad.

biguanide ◇ **biguanide** ◇ **biguanid** g. Molekul a zo ennañ daou vonad guanid, arveret evel enepdiabeteg genaouel; derialañ a ra gwered an insulin hep muiat ar borc'hañ anezhañ, hep risklañ ar gwadisvec'h glukoz; e degouezhoù 'zo evelkent e tegouezh an akidoz laktek da amwered diwarnañ.

bilan ◇ **balance** ◇ **mentel** b. -ioù Diforc'h niverel etre enankadoù hag ec'hankadoù un danvezenn lavaret; mannel, muiel pe leiel e c'hell bezañ; muiel, e verk ur saviad ennevidek, leiel, ur saviad eznevidek; *mentel c'hremm* a reer eus an diforc'h etre ar c'hementadoù gremm enankat hag ec'hankat d'ur reizhiad.

bilan articulaire ◇ **articular check-up** ◇ **amc'hwil** g. -ioù **an arzoù** Dewerzhañ heled fiñvoù oberiat ha gouzañvat an arzoù diwar-bouez ur c'hornventer.

bilan musculaire ◇ **muscular check-up, manual muscle test** ◇ **amc'hwil ar c'higennoù, dornimbouc'h** g. **ar c'higennoù** Kalvezder imbouc'h dre an daouarn evit dewerzhañ nerzh ar c'higennoù; dre ur skeul dereziet etre 0 ha 5 e notenner an disoc'hoù; 0 : argrezad diarvenn ebet gwelet pe deutaet; 1 : argrezad merzhet hep fiñvadenn eus ar rann gorf; 2 : fiñvadenn darnel ouzh ar ponnerder pe fiñvadenn glok e-maez gwered ar ponnerder; 3 : fiñvadenn glok ouzh ar ponnerder; 4 : fiñvadenn glok ouzh un harzerezh amgreñv; 5 : fiñvadenn glok ouzh un harzerezh kreñv.

bilan de santé, examen de santé ◇ **health check-up** ◇ **amc'hwil yec'hed** Arselladur an arc'hwelioù bevedel pennañ renet a-raok, goude pe emaez un imbouc'h klinikel war ur gouziviad kuit a nep klañvadur erzerc'h.

bile ◇ **bile** ◇ **bestl** b. Liñvenn velen pe arwer, gludek, c'hwerv, alkaliek, borc'het gant an avu, kadavet er gellenn vestl ha degorzhet en daouzegenn dre ar san vestl; ouzh he ober dour, kolesterol, fosfolipid, kevionennoù, *livegennoù bestlel* o tisoc'h eus ar gwadloezañ, *halioù bestlel* o kendaoliñ da livrizhañ an druzennoù; dre ar vestl e vez ezvevennet an darn vuiañ eus al liaoù.

biliaire ◇ **biliary** ◇ **bestlel** aa. 1 A-zave d'ar vestl, sk. : *trenkennoù bestlel*. 2 Arver hengounel : o kaout ur c'heñver (goulakaet) gant ar vestl, sk. : *kernel bestlel, terzhienn vestlel*.

bilie ◇ ◇ **bestlet** aao. & aa. A-zivout ur metoù tiñvañ bet ouzhpennet bestl dezhañ (sl. *BCG*).

bilieux ◇ **bilious** ◇ **bestlus** aa. 1 A-zivout un ezvevennad (c'hwelad pe darc'hoalad) a zo bestl ennañ. 2 Dre ledanviñ, a-zivout un anaev azonet gant an usvorc'h bestl pe gant un ezvevennad a zo bestl ennañ, sk. : *gwaskad bestlus* (sl. *crise bilieuse*).

biligenèse, biligénie, fonction biligénique ◇ **biligenesis** ◇ **bestlbarañ** Arc'hwel bevedel danzen ar vestl.

bilirubine ◇ **bilirubin** ◇ **bilirubin** g. Livegenn vestlel melen-arruz, kediad tetrapirrolek ancorvellek o tisoc'h diouzh eznevid an hemoglobin e-barzh ar reizhiad retikuloendotelel; dehetet gant ar gwad war-du an avu, kediet ouzh an albumin en ur furm dourandileiz (*bilirubin digraf* pe *ameeun*), neuze krafet ouzh an drenkenn c'hlikuronek (*bilirubin krafet* pe *eeun*) hag ezvevennet dre ar vestl (ent kleñvedel e vez bezant en troazh); erfñ, en oaled ar pervez, treuzfurmet en urobilinogen hag e sterkobilinogen.

bilirubinémie ◇ **bilirubinaemia** ◇ **gwadvec'h** g. **bilirubin, bilirubinwadvec'h** g. Feur ar bilirubin er gwad; etre 3 ha 4 mg/l emañ gwadvec'h ar bilirubin ameeun; usvec'h a vez en ikter dre wadloez; etre 3 ha 10 mg/l emañ gwadvec'h ar bilirubin eeun; usvec'h a vez en ikter an avufo, er c'hirroz.

bilirubinurie ◇ **bilirubinuria** ◇ **1 troazhvilirubinegezh** b. **2 troazhvec'h** g. **bilirubin, bilirubindroazhvec'h** g. 1 Bezañs bilirubin en troazh, diwar an avufo pe e dianlen steviadur ar forzhioù bestl. 2 Feur ar bilirubin en troazh.

biliverdine ◇ **biliverdin** ◇ **biliverdin** g. Livegenn vestel gwer furmet er reizhiad retikuloendotelel e-kerz ezvederezh an hemoglobin e bilirubin, dre zigoradur ar c'horvell porfirek (koleglobin), koll an houarn (biliverdinogloblin) hag, en diwezh, rannadur e globin hag e biliverdin, hemañ direet da c'houde e bilirubin.

Billroth : **opérations de** ~ ◇ **Billroth's gastrectomies** ◇ **oberatadennoù Billroth, kreuzezvenadoù Billroth** Rizhoù kreuzezvenañ darnel savelet gant Billroth e 1880 (dazbidañ ar porzhier ha dasforzhañ kreuz-daouzegenn) hag e 1885 (dazbidañ ar porzhier, ezkaelañ an daouzegenn ha dasforzhañ kreuz-yunegenn tu-ouzh-tu diadreñv).

biloculaire ◇ **bilocular** ◇ **divlog** aa. A-zivout ur gavenn naturel rannet e daou gant ur mulgul.

biloculaire : **estomac** ~, **estomac en sablier** ◇ **bilocular stomach** ◇ **stomok g. divlog** Stomok rannet e div gavenn dre ur strishaenn diwar un andag pe diwar gleizenn un angreizh.

biologie ◇ ◇ **daouadezh b. (kammneuziadoù kalon)** Naoued kalon anezhañ kevreted div gammneuziad : kehentad etrefokigoù hag isvull kef talmerenn ar skavent.

binéphrectomie ◇ **double nephrectomy** ◇ **ezvenañ an div lounezh, divlounezhezenañ** Dilemel surjaniel an div lounezh pa vez anafoù daoudu dibare, ar gourbevañ o vezañ kevaraezet dre an hemodializ trebad da c'hortoz un treuzplantañ.

binoculaire ◇ **binocular** ◇ **daoulagadel** aa. O tisoc'h eus kevredañ gweled an daou lagad.

bio-

• *biologiquement* ent bevoniel • *biosynthèse du glycogène à partir du glucose* bevenaozañ ar glikogen a-ziwar ar glukoz • *catalyseurs biochimiques* treluskerioù bevgimiek • *d'origine chimique, botanique, biologique* a orin meinel, struzhel, loenel • *laboratoire de biologie médicale* arnodva bevoniezh vezegel • *leur biosynthèse s'effectue par l'intermédiaire de l'acide orotique* bevenaozet e vezont dre hantererezh an drenkenn orotek • *liquides biologiques* liñvennoù bevel • *manifestations cliniques et biologiques* erzerc'hadoù klinikel ha bevoniel • *ponction-biopsie* bevsav dre ezwanañ • *propriétés biologiques des molécules* perzhioù bevedel ar molekulel.

bioartificiel ◇ **bioartificial** ◇ **bevkalvezadel** aa. A-zivout un organosod hiron o kevreañ ur parzh bevedel (enezigoù Langerhans a orin loenel da skouer e tro un osod ilgreiz) hag ur parzh kalvezadel (da skouer, ar gennenn lakaet da c'hronnañ an enezigoù evit o gwareziñ ouzh an distaol hangaeel ha kevaraezañ an eskemm etre an organosod hag ar bevedeg ostiz).

biocalorimétrie ◇ **biocalorimetry** ◇ **bevwrezventerezh** g. Muzulierezh ar c'hementadoù gwrez ganet gant an traoù bev.

biochimie ◇ **biochemistry** ◇ **bevgimiezh** b. Diskiblezh o studiañ an dazgweredoù kimiek en anadennoù ar beved.

biodégradable ◇ **biodegradable** ◇ **bevizspennadus** aa. A-zivout un danvezenn a c'hell bezañ dispennet diwar-bouez argerzhioù ar beved, keal diazez evit a sell an trevva.

bioDisponibilité, disponibilité biologique des médicaments ◇ **bioavailability** ◇ **bevhegerzded** b. Efedusted ul lia andalet e-keñver un nebeut parennoù : feur ar wezhuzenn o tiraaz an organ buk hag he buanded d'e ziraez.

bioélectricité ◇ **bioelectricity** ◇ **bevdredan** g. Tredanvarr pe tredanread ganet gant an traoù bev.

bioélectrogenèse ◇ **bioelectrogenesis** ◇ **bevdredanbarañ** Genel anadennoù tredanel gant ar gwiadoù bev.

bioénergétique ◇ **bioenergetics** ◇ **bevc'hremmoniezh** b. Studi an anadennoù e-keñver enankañ, treuzfurmiñ, ec'hankañ ar gremm gant an traoù bev.

bioéthicien ◇ **bioethician** ◇ **1 bevvezoniour g. -ion 2 bevvezour g. -ion** 1 Arbennigour war ar bevzevelezh. 2 Dalc'hiad un doazhadur dibarek a-fet bevzevelezh.

bioéthique ◇ **bioethical** ◇ **1 bevzevel** aa. **2 bev-zivezoniel** aa. **3 bevzevek** aa. **4 bevvezour** aa. 1 A-zave d'ar bevzevelezh, sk. : *an diarsell bevzevel*. 2 A-zave d'ar bevzevezezh, sk. : *ur gudenn bevzevezezh*. 3 Barnet evel kantreizh a-fet emellout en arc'hwelioù ar beved, sk. : *ha bevzevek eo dazverañ ar genom?* 4 O sevel a-du dre ar mennoziou hag an oberoù gant un doazhadur dibarek a-fet bevzevelezh, sk. : *un emzalc'h bevvezour*.

bioéthique, éthique médicale ◇ **bioethics** ◇ **1 bevzevelezh b. 2 bevzevezezh b. 3 bevzevegezh b. 4 bevzeveouriezh** aa. 1 Preder a-zivout kantreizhded emelloù ar vezeion hag an imboure'herion en arc'hwelioù ar beved. 2 Diskiblezh o studiañ ar bevzevelezh. 3 Doare dezevout hag ober barnet evel kantreizh a-fet an emellout en arc'hwelioù ar beved. 4 Doazhadur dibarek e-keñver bevzevelezh.

biofeedback ◇ **biofeedback** ◇ **korwezhañ** g. Kalvezder mestroniañ ar fromoù hag an azlammoù anezho war an arc'hwelioù flugezel, kalongwazhiedel pergen, dre arverañ arhentou a ro tro d'ar gouziviad da anaout ha da c'houarn e erwezhiadoù.

biogenèse ◇ **biogenesis** ◇ **1 bevc'henelezh b. 2 bevbarañ** 1 Arlakadenn o haeriñ ez ampleg ganedigezh nep bev ur bev kent, a-gevenep da arlakadenn an anvevc'henelezh o kelenn e c'hell bevion diwanañ war eeun eus an danvez anvev. 2 Genel ur bevedeg pe un danvezenn vevel, sk. : *bevbarañ un hormon*.

biogénétique : **loi** ~ ◇ **biogenetic law** ◇ **saveleñ b. an azhildarzh** Saveleñ dezgeriet gant Haeckel e 1827 : "An unandarzh zo un diverrad herrek eus an hildarzh" : lerc'hiad ar stadoù ma tremen drezo ur bevedeg ahed e ziorreadur adalek ar vi betek an oadouriezh zo un eillun eus ar furmoù kemeret a-hed an emdroadur gant lerc'hiad ar bevion ez eo eñ an diskennad anezho.

biologie médicale ◇ **medical biology** ◇ **Bevoniezh b. vezegel** Rann eus ar Vevoniezh o kendaoliñ da zeznaou ar c'hleñvedoù.

biologie moléculaire ◇ **molecular biology** ◇ **Bevoniezh volekulel** Rann eus ar Vevoniezh oc'h imboure'hiñ al luniadoù molekulel (da skouer hini an RNA hag an DNA) ; tro a ra, diwar-bouez *hilsontou* (Gl. *sondes génétiques*), da hennadiñ garvevion,

da zeznaouiñ kleñvedoù hêrezhel ha yoc'hennoù; ur skourr anezhi, an *Hiloniezh volekulel* (Gl. *génétique moléculaire*) zo en orin an *Hilouriezh* (Gl. *génie génétique*), embregouriezh *dazverañ ar gen* (Gl. *manipulation génétique*) ha, dre se, kevanaozañ ha kenderc'hañ danvezennoù bevedel (hormonoù, vaksinoù).

biologiste ◇ **biologist** ◇ **bevonior** g. -ion 1 Imbourc'her war anadennoù ar beved. 2 Doktor war ar Vezekniezh pe al Liaerezh oc'h embreger ar Vevoniezh vezegel en un arnodva elfennañ mezegel.

bioluminescence ◇ **bioluminescence** ◇ **bevdreluc'h** g. Perzh o deus bevedegoù 'zo da c'henel luc'h dre un dazgwered oksidañ-diren etre un dindanad (al lukiferin) hag un enzim (al lukiferaz) e diastok an oksigen.

biomatériau ◇ **biomaterial** ◇ **bevfafarenn** b. Danvezenn a reer ganti an osodoù, an organoù kalvezadel, an aveadoù diseurt arveret en embregerezh mezegel ha bevoniel : metalioù, kroc'han, daskediadoù, deveradoù diwar ar c'harbon.

biomécanique ◇ **biomechanics** ◇ **Bevloc'honiezh** b. Diskiblezh o tedalvout al Loc'honiezh da studi fiñvoù an organoù bev, ar c'henvelloù pergen (sk. : *loc'honiezh ar chaokat, ar glin*).

biomédecine ◇ **biomedicine** ◇ **Bevezekniezh** b. Rann eus ar Vezekniezh liammet ouzh ar Vevoniezh.

biomédical ◇ **biomedical** ◇ **bevezegel** aa. A-zave d'ar Vezekniezh e kement m'emañ liammet ouzh ar Vevoniezh.

biométéorologie ◇ **biometeorology** ◇ **Bevhinouriezh** b. Studi delanvad an hin war ar bevion.

biométrie ◇ **biometry, biometrics** ◇ **1 Bevventouriezh 2 bevventerezh g. 3 Bevstadegouriezh b. 4 Hoalidebegouriezh b.** 1 (Ster hollek) dedalvezadur hentennoù jedoniel da anadennoù ar beved. 2 Muzulierezh mentoù un organ en ur gouziviad. 3 Skourr eus ar Vevoniezh o tedalvout hentennoù ar Stadegouriezh da studi ar bevion. 4 Jedouriezh an hoali tebek.

biométrie oculaire ◇ **biometry of the eye** ◇ **bevventerezh g. al lagad, lagadventerezh g.** Muzulierezh stenwezadel mentoù al lagad en ur gouziviad.

biomicroscope ◇ **biomicroscope** ◇ **bevgorrgresker g. -ioù, biomikroskop g. -où** Trevnad o kevreañ ur c'horrgresker hag ur skarrlamp (stignadur goulaouiñ o teurel ur bann luc'h kreñv stiet war ur gorread strizh).

biomicroscopie ◇ **biomicroscopy** ◇ **bevgorrgreskerezh g.** Ensellout ar gwiadoù bev dre ar c'horrgresker; el Lagadouriezh, imbourc'h parzhioù al lagad (kambr arak, ferenn, gwereg) diwar-bouez ar bevgorrgresker.

bionique ◇ **bionics** ◇ **bionik** g. Diskiblezh o tedalvout d'al Loc'honiezh ha d'an Elektronik anaoudegezhioù gounezet dre studi ar bevion.

biopériodicité ◇ ◇ **bevdrovezhiegezh** b. Argemmoù korvezek en arc'hweliou ar beved.

biopharmaceutique ◇ **biopharmaceutics** ◇ **bevliaouriezh** b. Skiant ar c'heñverioù etre perzhioù fizikel-kimiek al liaoù hag o gweredoù bevedel; studiañ a ra ar parennoù diseurt (strinkennegezh, ment ar rannigoù, natur an ambrougenn, mod oberierezh) o telanvadiñ assugadur al liaoù gant ar bevedeg; ar pal eo reiñ ar furm efedusañ d'ar wezhuzenn.

biophysique moléculaire ◇ **molecular biophysics** ◇ **Bevfizik g. molekulel** Diskiblezh o tedalvout hentennoù ar Fizik molekulel da studi ar beved.

bioprothèse, hétérogreffe valvulaire ◇ **bioprosthesis, xenograft valve** ◇ **bevosod g., trapigosod g. allspesadien, imboud g. trapig allspesadien** Trevnad bihan a anlener ouzh gwask an aortenn pe ar gwask kentez-kofig evit amsaviñ an trapigod displeberet; graet int gant sac'helloù kornloarek moc'h pe diwar amgalonenn vuoc'h arwerc'het ent kimiek evit kreñvaat o gwevnded ha lemel o antigend; o festañ a reer war ur walenn vetal gronnet gant mezell; surjianed 'zo a ra gant bevosodoù a orin denel (*trapigosodoù unspesadien*, Gl. *homogreffes valvulaires*).

biopsie ◇ **biopsy** ◇ **bevsav** g. & v. Erlamadur un darn organ pe yoc'henn diwar ar bev evit he elfennañ; an elfennadur a c'hell bezañ un imbourc'h wiadoniel, bevgimiek, garvevoniel pe hangaoniel; hervez an araez arveret e tiforc'her meur a vod : *bevsav dre suc'hañ* (Gl. *biopsie par aspiration*, Sz. *aspiration biopsy*) borc'hadoù bonan pe gleñvedel; *bevsav dre dalarañ* pe *dre ezwanañ* (Gl. *biopsie par forage*, Sz. *drill biopsy*, ou *par ponction*) diwar-bouez ur broskan oc'h erlemel ur rolled gwiaoù a-dreuz d'ar c'hroc'hen; *bevsav gorre* pe *lifrad* (Gl. *biopsie de surface* pe *frottis*, Sz. *surface biopsy* pe *smear*) dre erlemel ur c'hleborenn dre rimañ ur glourgenn pe an ezkroc'hen; *bevsav engweliñ* (Gl. *biopsie par voie endoscopique*); *bevsav ezvenañ* (Gl. *biopsie exérèse*) oc'h araezañ dilemel war un dro ur werblenn pe ur yoc'henn vihan; *bevsav diawezh* (Gl. *biopsie peropératoire*) graet e-kerz un oberatadenn surjianel.

biopsier ◇ ◇ **bevsav** aao. : -et 1 Oberata (ub.) dre vevsav. 2 Erlemel (udb.) dre vevsav.

bioptome, biotome ◇ **bioptome** ◇ **biptom** g. Gevel vevsav.

bioréactif ◇ ◇ **bevgeduzenn** b. Danvezenn (enzim, protein) ganet gant bevion, arveret evit hennadiñ ha dezventañ korfoù 'zo er Vevgimiezh pe er Vevoniezh volekulel.

biorythme, rythme biologique ◇ **biorhythm** ◇ **bevgorvez** b. Argemmadur trovezhiek an anadennoù bevoniel, danvez studi an *Amzervevoniezh* (Gl. *chronobiologie*).

biosmose ◇ **biosmose** ◇ **bevdreleizhiñ** Treleizhiñ o c'hoarvezout a-dreuz d'ar c'hennennoù bev.

biosynthèse ◇ **biosynthesis** ◇ **bevenaosañ, bevenaoz** g. Furmidgezh korfoù kimiek gant ar bevedegoù, diwar-bouez dazgweredoù enzimel peurliesañ.

biotaxie, taxinomie, taxonomie ◇ **biotaxis, taxonomy** ◇ **bevrummouriezh** b. Skiant rummañ ar bevion; diforc'hiñ an derezioù rummañ-mañ (*rummadoù*, Gl. *taxons*) : ar *riezad* (Gl. *règne*, Sz. *kingdom*), ar *skourrad* (Gl. *embranchement, clade*,

phylum, division, Sz. sub-kingdom, phylum, branch, ar *gevrennad* (Gl. *classe, Sz. class*), an *urzhad* (Gl. *ordre, Sz. order*), ar *c'herentiad* (Gl. *famille, Sz. family*), an *iskerentiad* (Gl. *sous-famille*), ar *meuriad* (Gl. *tribu*), ar *genad* (Gl. *genre, Sz. genus*), an *isgenad* (Gl. *sous-genre*), ar *spesad* (Gl. *espèce, Sz. species*), ar *seurtad* (Gl. *variété, Sz. variety*), ar *ouennad* (Gl. *race, Sz. race, breed*) (sl. *biotype*).

biotechnologie ◇ **biotechnology** ◇ **Bevgalvezouriezh b.** Diskiblezh o studiañ dedalvezadurioù greantel an anaoudegezhioù gounezh e domani ar Vevoniezh (Bakteriouriezh, Hilouriezh, Enzimouriezh, Hangaoniezh).

biothérapie ◇ **biotherapy** ◇ **bevgurañ** Hentenn yac'hadel, anezhi danveziñ tiñvadennoù bev (yaourt, goell, h.a.) pe danvezennoù bevel (sug kreuz, bestl, antikorfoù monoklonel, h.a.).

biotine, vitamine B 8, vitamine H, vitamine antiséborrhéique ◇ **biotin** ◇ **biotin g., vitamin g. B 8, vitamin H, vitamin enepsoavredek** Danvezenn vevsulfuret, eus stroll ar vitaminoù B, bevenaozet gant struzhennoù 'zo ha lies garvevion; c'hoari a ra evel ur c'hoenzim e lenadur ar CO₂ hag en dazgweredoù treuzkarboksilañ; parenn greskiñ eo ivez, diziouerus da galz bevedegoù; an negez anezhañ, gant ar razh, a zevoud un dermatoz soavredel.

biotique ◇ **biotics** ◇ **Biotik g.** Dedalvezadur ar Stlenneg, ar C'horrelektronik, an Emgefreouriezh d'ar Vevoniezh.

biotransformation ◇ **biotransformation** ◇ **bevdreuzfurmadr g.** Daskemmadurioù a c'hoarvez e-barzh ar bevedeg gant an danvezennoù estren, gant al liaoù pergen.

1 biotype 2 biotype, biovar ◇ **biotype** ◇ **1 bevrizh g. 2 rizhad g.** 1 Teskad an doarennoù piaouel a solier warno evit rummañ ar bevion. 2 Isrann ar spesad, rummad an hiniennoù a zo boutin etrezo un teskad doarennoù bredel pe vevedel, o glad hilel da skouer (sl. *biotaxie*).

biotypologie ◇ **biotypology** ◇ **Bevrizhouriezh b.** Studi an hiniennoù a un spesad, ar c'hemmoù etrezo hag an doare ma talvez an kez kemmoù da zespizañ rizhadoù.

bipariétal : diamètre ~ ◇ biparietal diameter ◇ **treuzkiz g. daouvoskitem** Regad etre daou vos kitem penn ar grouell, par da 9,5 cm; da geñver ar gwilioud mar bez arstrizh lestr ar vamm e vez leiaet an treuzkiz-se dre gevarlankañ an daou askorn.

biproalvéolie ◇ **bilabioversion** ◇ **raklogigezh b. daouek** Stouadur anreol war raok eus eskern al logigoù dent hag ar rakdent krec'h ha traoñ.

bi protrusion ◇ **double protrusion, Parrot jaw** ◇ **rakvezegezh b. daouek** Loadur anreol war raok eus an divweuz, diwar raklogigezh peurliesañ.

biréfringence ◇ **double réfringence** ◇ **daouc'houkoguster g.** Perzh gant metier hanahetek 'zo da zec'han dre c'houkog dizoubladur un hordenn luc'h dehaezet.

bisacromial : diamètre ~ ◇ bisacromial diameter ◇ **treuzkiz divgernskoaz** Regad etre div gern skoaz ar grouell.

bisalbuminémie ◇ **bisalbuminaemia** ◇ **daoualbuminegezh b. (ar gwadvez)** Bezañs daou seurt albumin er gwadvez : an eil, bonan, egile o tredannizhañ gant un tizh pe vrasoc'h (e-kerz ur bevastalgurañ paoterek, da skouer), pe vihanoc'h (daoualbuminegezh c'hanedigel, a orin hilel hep azonoù klinikel).

biseau

• *instrument plat, taillé en biseau à un pan tranchant* benveg plat, benet a-veskell, dezhañ un dremm skejus.

bisexualité ◇ **bisexuality** ◇ **1 divrevezh 2 divvegezh b. 3 divreviadegh b.** 1 O piaouañ organoù an div rev. 2 Gant neuzioù kreudel ha bredel an div rev. 3 O kaout darempredoù revel gant tud eus an eil rev hag eben.

bismuthémie ◇ **bismuthaemia** ◇ **1 gwadvismutegezh b. 2 gwadvec'h g. bismut, bismutwadvec'h g.** 1 Bezañs bismut er gwad. 2 Feur bismut er gwad.

bismuthisme ◇ **bismuthosis** ◇ **bismutegezh b.** Pistriadur o tarvezout e-kerz ar mezegadurioù dre ar bismut, da erzerc'hadoù dezhañ strafuilhoù koazhadel garv, genaoufo, troazhalbuminegezh hag, er par gwashañ, empenno bismutek.

bistouri ◇ **knife, bistoury** ◇ **erc'hel g. -où** Benveg surjianerezh e stumm ur gontell a vez e lavnenn fest, lem-laka pe eilplegadus en e droad (sl. *scalpel*).

bistouri électrique, bistouri à haute fréquence ◇ **electric knife, electric bistoury** ◇ **tredanerc'hel g. -où, erc'hel uheldalm** Benveg surjianerezh a zanvezer drezañ ar wrez ganet gant ar redoù tredan uheldalm evit troc'hañ ha kaouediñ.

bitachycardie, double tachycardie ◇ **double tachycardia** ◇ **kalonustead daouek** Kevreted kentezustead pe kentezustead-migorvez ha kofigustead.

bitemporal : diamètre ~ ◇ bitemporal diameter ◇ **treuzkiz g. daouvidig** Regad diadrez klopenn ar grouell muzuliet etre an div vellez a 'r gurumenn, par da 7,5 cm.

biothérapie ◇ **daougurañ, daougurad g.** Arver daou vezegadur, dre gevredañ daou lia da skouer, termen arveret da geñver prederiadur an haza, an avufo C, an uswask talmerel, h.a.

bitonal : voix ~e, diplophonie ◇ **diplophonia** ◇ **mouezh b. daoudon** Strafuil er mouezhparañ anezhañ ec'hodiñ daou son war un dro, dezho pep a uc'hder; stadet a) pa vez seizet ur pleg mouezh, b) pa vez divrannet faout an tarzh gant ur polip pe un nozelenn.

diamètre bitrochantérien ◇ **bitrochanteric diameter** ◇ **treuzkiz g. daoudrovaleg** Regad etre daou drovaled bras ar grouell, par da 9 cm.

biuret : réaction du ~ ◇ **biuret test** ◇ **prouad g. ar biuret** Livrezh limestra-mouk oc'h anadiñ pa arwerc'her ar *biuret* (disoc'h kendouesadur daou volekul urea) dre ur vazenn (lisiv soda pe kali) hag un tammig sulfat kouevr; talvout a ra da lakaat war wel ha da zezventañ protid 'zo o tazgwerediñ evel ar biuret.

Björk : syndrome de ~ ◇ **flush syndrome** ◇ **azoniad g. ar gwrid** Barradoù gwazhiedloc'hadel (gwridadoù) en dremm o tedreñ alies war goueled un dulas padek ha kevret a-wechoù gant trec'hwezh hag enkreuz; c'hoarvezout a reont da heul ar borc'hadur gant yoc'hennoù karkinoidel ar vouzellenn voan eus ar c'hallikrein o tevoudañ gwadusvec'h ar bradikinin hag ar c'hallidin (sl. *bradykinine, carcinoïde, kallicréine, kallidine*).

Blakemore : sonde de ~ ◇ **Blakemore's tube** ◇ **korzenn b. Blakemore** Sont stomok teirforzh arveret da brederiañ ar gwadliñvoù diwar fregadur teuc'helloù an treizher, outañ div gellenn aer-pe dourhevolc'h, an eil en e zibenn, pelennek, ouzh e festañ e deun ar stomok, eben war e dreug, kranennek, oc'h amwaskañ an teuc'helloù hag oc'h araezañ ar wadkae.

Blalock-Clagett : opération de ~ ◇ **Blalock-Clagett's operation** ◇ **oberatadenn b. Blalock-Clagett** Gwezh surjianeel evit parraat ouzh isvoll ganedigel strizh an aortenn, anezhañ amparañ un dasforzhad penn-ouzh-tu pe penn-ouzh-penn etre an dalmerenn endan-drebez hag an aortenn a-ziskenn.

Blalock-Hanlon : opération de ~ ◇ **Blalock-Hanlon's operation** ◇ **oberatadenn Blalock-Hanlon** Gwezh surjianeel goustegus graet war an nevezc'hanidi tizhet gant naouedoù kalon dulaseiat evel da skouer kammload ar gwazhied bras, anezhañ amparañ ur c'hehentañ etre ar c'hentezoù dre c'houvenañ ur parzh ledek pe ledekoc'h eus an dilhenn war-benn gwellaat oksigenadur ar gwad trobarzh.

Blalock-Taussig : opération de ~ ◇ **Blalock-Taussig's operation** ◇ **oberatadenn Blalock-Taussig** Gwezh surjianeel goustegus graet war ar magadelled tizhet gant kammneuziadoù kalon dulaseiat (isvoll kef ar skevent, pevaradezh Fallot), anezhañ amparañ un dasforzhad trogorf-skevent penn-ouzh-tu pe penn-ouzh-penn etre an dalmerenn endan-drebez (dehou pe gleiz) hag an dalmerenn skevent a-gendu; pal hevelep amdreugad eo muiat kas an dalmerenn skevent ha gwellaat an hematoz dre lakaat da astremen er skevent gwad anpeurvec'h.

blanc

• *décoloration des cheveux aboutissant à leur blanchiment* dislivañ ar blev o tisoc'h gant o gwennadur • *substance blanchâtre* danvezenn arwenn.

blast injury, blessure par souffle, accident du souffle ◇ **blast injury** ◇ **aerstroñsad g., bloskanafad g., fuc'hanafad g.** Darvoudoù dec'hanet gant fuc'h ur bloskad, anezho anafoù strewek ar benvegad anañ (dasfregadoù, gwadfennadoù strewek, gwatoñvoù), rogadur an daboulin, gloazadoù e kavenn ar bruski, er gouzoug hag er c'hof, anoksiezh, marvus a-wechoù.

blastème ◇ **blastema** ◇ **blastem g.** Er rizhell, stroll kelligoù mezoblastek war ziorren a yelo d'ober un organ pe ur parzh korf, sk. : *blastem un ezel* (sl. *mésoblaste*).

blasts ◇ **blasts, blast cells** ◇ **blast s.** Lostger arveret da aroueziañ ar c'helligoù anavez a vo kelligoù ar gwad e dibenn o emdroadur : *mieloblast, limfoblast, normoblast, monoblast*; arveret diged e talvez *blast* da anvad rumm war ar c'helligoù usveneged.

blastocèle ◇ **blastocèle** ◇ **blastokel g.** Kavenn greiz ar blastula.

blastocyste ◇ **blastocyst** ◇ **blastokist g.** Anv roet da vlastula ar bronneged.

blastoderme ◇ **blastoderm** ◇ **blastoderm g.** Kennenn gezivik ar grouell.

blastome ◇ **blastoma** ◇ **blastom g.** 1 Yoc'henn evodet diouzh ur blastem. 2 Arveret evel lostrann, o verkañ orin grouellel ur yoc'henn, sk. : *mieloblastom*.

blastomère ◇ **blastomer** ◇ **blastomer g.** Teskad ar c'helligoù ganet diwar rannadurioù kentañ ar vi frouezhiget.

Blastomycètes ◇ **Blastomycetes** (u. : **Blastomyces**) ◇ **Blastomiket s.** Kevrennad foue o ouennañ dre vroñsañ, gougevret outi ar goveion (evel goell ar bier ha *Candida albicans*, hadenn ar borb).

blastomycose ◇ **blastomycosis** ◇ **blastomikoz g.** Anvad rumm ar poreadoù diwar ar Blastomiket; evit aozerion 'zo e tleer strishaat erdal an termen d'ar mikoziou diwar ar foue blastoporek (kandidoziou ha kriptokokoziou).

blastose ◇ **blastoz g.** 1 Bezañs er gwad pe en organoù gwadparañ eus kelligoù yaouank pe dreuzfurmet. 2 Kleñved naouus dre ar vezañs-se, sk. : al *leukemiezh lemm*.

blastospores ◇ **blastospores** ◇ **blastospor s.** Spor ar foue o tiwanañ dre vroñsañ (ar goveion da skouer).

blastula ◇ **blastula** ◇ **blastula g.** Pazenn e diorreadur ar grouell etre pazennoù ar morula hag ar gastrula; enni e c'hoarvez ar blastoderm eus ur feilhenn hepken.

blast-

• *blastème génital* blastem ganadel • *d'aspect blastématique* a neuz vlastematus.

bleb ◇ **bleb** ◇ **bleb g.** Anvad rumm deskrius hepken lakaet war an hogennadoù aezhel pe liñvel hevonn e-barzh ar gwiadoù : bozhelloù, c'hwezigennoù, filboc'hennoù, gloevennoù, kistoù, klogorennoù, ugeolennoù (sl. *ampoule, bouton, bulle, cloque, kyste, phlyctène, vésicule*).

blennorragie, gonorrhée, chaude-pisse, échauffement, goutte militaire ◇ **blennorrhagia, gonorrhea** ◇ **blennorragiezh** b., **gonorreenn** b., **tostred** g., **gorflus** g., **troazhañ-berv** g., **banne** g. **milourel** Kleñved revdredizhus (gwenerel) diwar ar gonokok (*Neisseria gonorrhoea*), oc'h erzerc'hañ gant ar gwaz dre danijenn ar c'han troazh (*kantraozhfo gonokokel*), gant ar vaouez dre danijenn ar c'hourzh, ar gouin pe ar grozh (*kourzhfo, gouinfo, krouzhfo gonokokel*); tanijennoù heñvel treuzkaset ivez da geñver an darempredoù revel zo dezho da wezherioù kleñvedus *Trichomonas, Candida, Chlamydia*.

blépharite ◇ **blepharitis** ◇ **malvenno** g. Tanijenn ar valvenn, lec'hiet er ribl rez anezhi peurliesañ.

blépharochalasis ◇ **blepharochalasis** ◇ **usgad** g. **ar malvennoù, malvennusgad** g. Isteñv derm ar malvennoù krec'h ha laoskted ar gwiaz kellaouek endan-groc'hen, o tec'han furmidigezh un aspleg kroc'hen a-ispilh dirak al lagad.

blépharoconjunctivite, blépharophtalmie ◇ **blepharoconjunctivitis, blepharophtalmia** ◇ **malvennkevresafo** g. Tanijenn ar malvennoù ha kevresaes al lagad.

blépharophimosis ◇ **blepharophimosis** ◇ **amgul** g. **ar malvennoù, malvennamgul** g. Kammneuziad kemplezh ar malvennoù, hêrezhel pe arzeuat, anezhi strizhded faout ar malvennoù, berded hag islink ar valvenn grec'h, epikantuz.

blépharoplastie, blépharopoièse ◇ **blepharoplasty, blépharopoiësis** ◇ **ateliñ ar malvennoù, malvennateliñ, asparañ ar malvennoù, malvennasparañ** Nep oberatadenn dazluniañ ar malvennoù goude un anaf daraezel; kemm a lakaer a-wechoù etre an daou dermen dre reiñ ur ster hollek da *-plastie, plasty, (-)ateliñ* ha, da *-poièse, -poiësis, (-)asparañ*, ster dibarek un ateliñ dre atreañ ur c'holl gwiaz.

blépharoptose, ptosis ◇ **blepharoptosis, ptosis** ◇ **islink** g. **ar valvenn grec'h, malvennislink** g., **ptoiz** g. Dic'halloud da beure'horren ar valvenn grec'h; gant an termen klok e reer kentoc'h pa vez an anaer e dalc'h un anaf er valvenn, gant *ptoiz* pa vez e dalc'h un anaf navel.

blépharorrhaphie ◇ **blepharorrhaphy** ◇ **dlita ar malvennoù, malvenndlita** Krafaelañ ar malvennoù, gwezh surjaniel evit strishaat faout ar malvennoù.

blépharospasme ◇ **blepharospasm** ◇ **andag** g. **ar malvennoù, malvennandag** g. Dargrezad kigenn gelc'hennek al lagad e dalc'h un hegeuz lagad pe un anaf kreiz er c'hrennempenn (*malvennandag dianempennfo*); an andag a c'hell bezañ padek (*malvennandag tantek*) pe c'hoarvezout a wilc'hadoù buan hag arreat (*malvennandag kridek*).

blépharostat ◇ **blepharostat** ◇ **malvenndalc'her** g. **-ioù** Benveg arveret da zerc'hel digor ar malvennoù da geñver an oberatadennoù war ar voull lagad.

blépharotoc ◇ **blepharospasm** ◇ **malvennskruz** g. **-ioù** Argrezad andiarvenn trumm un pe lies kigenn a 'r malvennoù; ent klasel, dre zespizadur ez eo bredel ar *skruz*, warnañ neuz ur meid, ha kreudel an *andag*, oc'h azonañ un direizh navel; er c'hlinik avat e vez diaes skarat alies, ken ne laka aozerion 'zo kemm ebet etre ur *malvennskruz* hag ur *malvennandag kridek*; deskrivet e vez lies furm skruziou a 'r malvennoù : *skruz ar gwilc'hata* (Gl. *clignotement, nictitation, nictation*, Sz. *nictation*), arreata buan ar gwilc'hañ reol, anezhañ argrezadoù kigenn gelc'hennek al lagad kevret a-wechoù gant argrezadoù ar c'higennoù kedaler, krizer an abrant hag uhelaer ar weuz krec'h; *skruz an dispourbellañ* (Gl. *tic d'écarquillement*), anezhañ un argrezad tantek o tevoudañ uc'higor faout ar malvennoù.

blessure ◇ **wound, injury, lesion** ◇ **gloazad** g. **-où** Nep anaf lec'hiek graet gant ur gwezher diavaez.

bless-

• *blessure opératoire* gloazad oberatael • *évacuer un blessé* digarzhañ ur gloazad.

bleu alcian ◇ **alcian blue** ◇ **glaz** g. **alkian** Ftalokianin dourzileizh, dezhañ ur c'horvell kouevrek, danvezet da livuzenn spesadel ar mukopolisakaridom trenkek.

bleu de bromophénol ◇ **bromophenol blue** ◇ **glaz bromofenol** Livuzenn o lenañ ouzh ar protid hag oc'h araezañ o dinoñ goude tredannizhañ war baper.

bleu de méthylène ◇ **methylene blue** ◇ **glaz metilen** Danvezenn arveret evel livuzenn er Wiadoniezh, evel dilouezher troazhadel hag evel lia ouzh ar gwadusvec'h methemoglobin.

bleu Evans ◇ **Evans blue** ◇ **glaz Evans** Livuzenn o skignañ buan hag a-ziuz er gennad plasmatek, dre se oc'h araezañ muzuliañ an ec'honad anezhañ.

bleue : **maladie** ~, **cyanose congénitale** ◇ **congenital cyanosis** ◇ **dulaz** g. **ganedigel, kleñved** g. **glaz** Kleñved diwar gammneuzadoù kalongwazhiedel (pevaradezh Falloet pergen) o tevoudañ un heptreug gwazhienn-talmerenn, eleze an tremen eus ar gwad gwazhiennel er gwad talmerel, da azonoù pennañ dezhañ : dulaz an amwiskadoù hag ar glaourgennoù, hipokrategezh ar bizied, elruz, trec'hwezh, isniñv korfel, direizhoù navel, an holl anezho e dianlen ar gwadusvec'h oksigen, marvus anez oberata.

blindage, bouclier ◇ **shield** ◇ **boukler** g. **-ioù** Gwiskad danvezioù lugus a staler evit gwareziñ diouzh ardizh diezhomm ar skinadoù ionaes arveret da imboure'hiniñ pe da vezegañ.

bliester, plaquette thermoformée ◇ **bliester pack** ◇ **bliester** g. **-ioù** Mod arbaradur arveret el liaerezh evit an drajez, ar moustradoù, ar bolc'hanoù, h.a., ar re-mañ o vezañ enklozet e-barzh koagennoù ur goc'henn vezell peget ouzh ur feilhenn aluminiom.

bloc alvéolocapillaire ◇ **alveolar capillary block** ◇ **isfu** g. **logigoukorrwazhied** Anaer o parraat ouzh an oksigen a fuiñ eus al logigou skevent d'ar c'horrwazhied, e dalc'h parennoù diseurt : disleberad (skleroz pe gouliñv) speur al logigou pe ar c'horrwazhied, stad al liñvenn entremezel, stad plasma ar gwad ha kennenn an hemati, strishadur naoz ar c'horrwazhied ha buanadur

amred ar gwad; erzerc'hañ a ra dre lejadur ar barr fuiñ skeventel, gwadisvec'h an oksigen hag an dioksidenn garbon; dianlen eo d'ar fibrozioù skevent entremezel strewek, d'ar sarkoidoz ha d'ar berillioz skevent.

bloc atrioventriculaire, bloc auriculoventriculaire ◇ **atrioventricular heart block** ◇ **tolc'had g. kentez-kofig** Gorregeañ pe arsaviñ treled ar gwerederezh tredan er rehentou kentez-kofig; rummet e vez an tolc'hadou kentez-kofig etre *tolc'hadou diglok (kentañ hag eil derez)* pa na vez ket dizalc'h krenn argrezadoù ar c'hofig diouzh argrezadoù ar c'hentez ha *tolc'hadou klok (trede derez)* pa vez peurzizalc'h argrezadoù ar c'hofig diouzh re ar c'hentez; komz a reer eus *tolc'had kentez-kofig arc'hwelel* pa vez an tolc'had kentañ pe eil derez e dianlen, n'eo ket un direizh naouedel eus an tredanren, met un ustalm anreol eus ar blivadoù agentez (gougren pe kentezusteadoù 'zo).

bloc cardiaque, bloc du cœur, blocage du cœur ◇ **heart block** ◇ **tolc'had kalon** Gorregeañ (tolc'had diglok) pe arsaviñ (tolc'had klok) eus treled gwerederezh tredan ar galon; hervez an degouezhioù e sez ar mire (direizh an tredanren) : 1) er c'hev-re god-kentez (*tolc'had god-kentez*); 2) etre an daou gentez (*tolc'had etre-kentezoù*) dre anaf hordenn Bachmann; 3) etre ar c'hentezoù hag ar c'hofigoù (*tolc'had kentez-kofig*); 4) war varroù dehou pe gleiz an hordenn gentez-kofig pe hordenn His (*tolc'had barr*) pe en ur c'havaz eus ar barr kleiz (*tolc'had rannvarr araok pe adreñv*); 5) e par rouedad Purkinje (*tolc'had bleñchennoù, tolc'had rouedad, tolc'had purkinjeel, tolc'had annonek*); 6) e par speur ar c'haer kalon (*tolc'had speur*), tolc'had hemañ na ziforc'her ket peurliesañ diouzh an tolc'had purkinjeel.

bloc cardiaque congénital ◇ **congenital heart block** ◇ **tolc'had kalon ganedigel** Mire kentez-kofig diwar ur gammneuziad er gwriad kalonaoter etre ar c'hloim god-kentez ha kavaz an hordenn gentez-kofig.

bloc dans le bloc ◇ **block in the block** ◇ **tolc'had en tolc'had** Kevreted daou vire lec'hiet e daou live kevarall, da skouer tolc'had kentez-kofig ha tolc'had kofig; drezañ e tispleger ar grezvarroù istead hag ar paouezioù kalon hir o c'hoarvezout er poulz gorrek pad.

bloc de branche ◇ **bundle-branch block** ◇ **tolc'had barr** Mire o sezañ war varr dehou pe war gef boutin barr kleiz an hordenn kentez-kofig.

bloc de branche alternant ◇ **alternating bundle branch block** ◇ **tolc'had barr pebeilat** Stumm tolc'had barr daoudu naous er c'halonvarrwezañ dre un arvez tolc'had barr dehou a bep eil gant un arvez tolc'had barr kleiz.

bloc de branche bilatéral ◇ **bilateral bundle branch block** ◇ **tolc'had barr daoudu** Kevreted un tolc'had barr dehou hag un tolc'had rann kleiz (sl. *bibloc*).

bloc de branche mono-, bi-, tri-, plurifasciculaire ◇ **mono-, bi-, tri-, plurifascicular bundle branch block** ◇ **tolc'had barr un-, daou-, tri-, liesstirad** An trevnad nervren enkofigel o vezañ daou stirad oc'h ober ar parzh krec'h anezhañ (barroù dehou ha kleiz an hordenn gentez-kofig), ha tri stirad e barzhioù etre ha traoñ (barr dehou, rannoù araok hag adreñv ar barr kleiz), e c'hell ar mire sezañ war unan, daou pe an tri stirad; an *tolc'had tristirad* a anver c'hoazh *tolc'had kentez-kofig klok*.

bloc de sortie ◇ **exit block** ◇ **tolc'had eztreu** Gwikefre goulakaet evit displegañ un anadenn stadet e-kerz ar barasistoliezh, anezhi disujadur ar c'hofigoù diouzh korvez al lezkreizenn e gounid ar gorvez kentezel diwar an ampoent ma 'z afe herrekoc'h korvez al lezkreizenn eget ar gorvez kentezel.

bloc fasciculaire ◇ **fascicular block** ◇ **tolc'had stirad** Anvad rumm a lakaer war an tolc'hadou o sezañ war un pe lies stirad (barr, rannvarr pe isrannvarr) eus an hordenn gentez-kofig.

bloc focal, bloc intraventriculaire ◇ **intraventricular block** ◇ **tolc'had annonek, tolc'had enkofigel** Mire e diabarzh ar c'hofig diwar un anaf en isrannoù pellek unan eus barroù an hordenn gentez-kofig; tizhet e vez un tachad argrenn eus speur ar galon; ar re baotañ eo tolc'hadou annonek ar c'hofig kleiz; arbenn boasañ an tolc'hadou annonek eo an angwazhiad (*tolc'had tro-angwazhiad*); aozerion 'zo ne lakaont ket kemm etre an tolc'had annonek hag an *tolc'had speur*.

bloc infra-hissien, bloc distal ◇ **infra-His bundle block** ◇ **tolc'had iskefel, tolc'had pellek** Mire o sezañ dindan gavaz kef an hordenn gentez-kofig, eleze e par ar rannoù anezhi.

bloc infranodal ◇ ◇ **tolc'had isklomel** Mire o sezañ e-barzh ar c'hef (*tolc'had kefel*) pe ar barroù (*tolc'had pellek*) eus an hordenn gentez-kofig en ardraoñ d'ar c'hloim kentez-kofig.

bloc intra-atrial, bloc intra-auriculaire ◇ **intra-atrial block** ◇ **tolc'had enkentezel** Mire o sezañ etre an daou gentez; tolc'had dibaot, stadet en isvoll mintrek.

bloc intranodal, bloc proximal, bloc supra-hissien ◇ ◇ **tolc'had enklomel, tolc'had nezek** Mire o sezañ e-barzh ar c'hloim kentez-kofig.

bloc neuromusculaire ◇ **neuromuscular block** ◇ **tolc'had nervenn-kaher** Span treuzkas an nervlanv dre ar juntad nervenn-kaher.

bloc opératoire ◇ **operating theater** ◇ **kaelec'h g. oberata** Parzh en ur rann ospital a zo enni ar stavelloù ma rener ar gwezhoù surjaniel.

bloc pariétal ◇ **intraventricular heart block** ◇ **tolc'had speur, tolc'had enkofigel** Talc'had annonek naous dre un dale blivaaat bihan e speur gostezel araok ar c'hofig kleiz.

bloc plexique ◇ **peripheral nerve block** ◇ **tolc'hañ plezhad, tolc'hañ plezhadel** Kalvezder diaraeziñ parzhek dre ensilañ un diaraezer lec'hiek en dro da wriziennoù kefioù plezhad ar vrec'h.

bloc sino-atrial, bloc sino-auriculaire ◇ **sinoauricular heart block** ◇ **tolc'had god-kentez** Direizh dibaot e korvez ar galon diwar span treuzkas ar wagenn vlivaat etre ar god hag ar c'hentez.

bloc vertébral ◇ **intervertebral synostosis** ◇ **bloc'had g. mellennoù** Kendeuzad etre daou pe lies korf mellen, a-c'hanedigezh pe diwar ur c'heuziad garvevel (*mellenndiskfo poreel*, Gl. *spondylodiscite infectieuse*) pe all (*mellennarzfo tromaotus*, Gl. *spondylarthritis ankylosante*).

bloccage ganglionnaire ◇ **ganglionic blockade** ◇ **tolc'hañ kangrenn** Astaliñ dre araezioù kimiek an nervren e par ar sinaps en ur gangrenn simpatek.

bloccage intermaxillaire, bloccage bimaxillaire ◇ **intermaxillary wiring, intermaxillary blockade** ◇ **klaviañ an divaven** Araezad arveret da sonnañ an div aven el lakadur kehaz diwar-bouez argoulmoù, savnelloù pe waregoù.

bloccage méningé ◇ **spinal block** ◇ **kaelad g. pilhonel** Argerzh stankañ ha kombodiñ en un pe lies lec'h ar gavenn endan-gevnidek, ar c'hambroù pe ar ganol greiz, o skoilhañ red al liñvenn benn-kein, e dianlen glenelloù diwar ur pilhonfo pe an amwask dre berzh ur yoc'henn.

bloccage ventriculaire ◇ **ventricular block** ◇ **kaelad kambrel** Kaelad pilhonel eskantet gantañ un pe lies kamb empen diouzh ar gavenn endan-gevnidenn hag o tevoudañ an uswask enkloupenel.

bloccpnée (d'effort) ◇ **blockpnea** ◇ **sac'hanal g. (strivañ)** Barrad migañ kevret gant an anglevad stankadur ar forzhioù anañ, sellet evel ur c'hevatal leiek dilaur d'ar c'hevenkez strivañ (sl. *angor d'effort*).

bloquant : **anticorps** ~ ◇ **blocking antibody** ◇ **antikorf g. tolc'hus** Antikorf en araez da skoilhañ ouzh gwered bevedel antikorfou all pe limfokit, *in vivo* pe *in vitro*.

bloquant : **test** ~ ◇ **blocking test** ◇ **prouad tolc'hañ** Arnod evit anataat ar vezañs en ur gwadvez eus antikorfou antiRh tolc'hus na vezont ket dinoet dre an dazgwered dazgludañ ordinal.

blo(-), bloqu-

• *anticorps bloquant* antikorf tolc'hus • *bloc astragaloscaphoïdien* bloc'had fer-bulzune • *bloc atrioventriculaire* tolc'had kentez-kofig • *bloc complet* tolc'had klok • *bloc d'arborisation* tolc'had bleñchoù • *bloc de branche droite, gauche* tolc'had barr dehou, kleiz • *bloc distal* tolc'had pellek • *bloc fonctionnel* tolc'had arc'hwelel • *bloc interatrial* tolc'had etre-kentezoù • *bloc intrahissien* tolc'had kefel • *bloc pariétal* tolc'had speur • *bloc partiel* tolc'had diglok • *bloc péri-infarctus* tolc'had tro-angwazhiad • *bloc proximal* tolc'had nezek • *bloc purkinjien* tolc'had purkinjeel • *bloc réticulaire* tolc'had rouedad • *bloc sino-atrial* tolc'had god-kentez • *bloc tronculaire* tolc'had kefel • *bloccage artriculaire par corps étranger* kouboulad ar c'henvell dre gorf estren • *bloccage de l'activité électroencéphalographique* skoilhadur ar gweredezh empenvarwezadel • *bloccage de la transmission* span treuzkas • *bloccage des os* klaviañ an eskern • *bloccage du ligament annulaire par ossification* bloc'hadur dre askornaat eus ar stagell walennek • *bloquer la conduction nerveuse* tolc'hañ an nervren • *bloquer un pied équin* klaviañ un troad rakkamm • *bloquer une enzyme* heudañ un enzim • *sensation de bloccage respiratoire* anglevad stankadur ar forzhioù anañ.

"blouse blanche" : **effet** ~, **hypertension de consultation** ◇ **white coat effect, white coat hypertension** ◇ **gwered g. flotantenn wenn, uswask g. kuzulva** Muiat ar gwask talmerel gant ar c'houziviaded fromidik en amveziadoù an imboure'h mezegetl.

Blondeau : **incidence de** ~ ◇ **Waters' view** ◇ **dehaez g. Blondeau** Dehaez kilpenn-elgezh arveret er skinluniñ evit arseliñ ar c'hevioù lez-fri, kevioù ar garvan pergen; ar gouziviad a lakaer a-c'hourvez, stok e elgezh ouzh ar c'hased, ar skin stur oc'h entreuiñ e diaraog al lambda, dezhañ etre 10° ha 20° stou, hag oc'h eztreuiñ en divfron.

Boari-Casati : **opération de** ~ ◇ **Boari's operation** ◇ **oberatadenn b. Boari** Gwezh surjaniel anezhañ amsaviñ dibenn ar san droazh diwar-bouez un drailhenn c'hwezhiell ledenezet ha dolennet.

"bobbing" **oculaire** ◇ **ocular bobbing** ◇ **dazgwint g. an daoulagad** Fiiñvoù diazerc'h, arreat ha korvezek, kemparzhik an daoulagad stadet e-kerz komaoù 'zo kevret gant anafoù er pont.

body pack ◇ **body pack** ◇ **enbec'h g.** Mod dezougen dirgel an dramm (kokain, heroin, h.a.) dre guzhat sac'hadoù anezhañ e-barzh ar c'horf, er ganol vezhur pergen; pa c'hoarvez d'ur sac'had regiñ e vez tizhet an enbec'hier gant ur pistriadur lemm (sl. *syndrome des passeurs de drogue*).

Bohr : **effet** ~ ◇ **Bohr's effect** ◇ **gwered g. Bohr** Dilec'hiadur krommenn digediañ an oksihemoglobin dre zelanvad ar parennoù o c'hoari war grafusted an oksigen ouzh an hemoglobin; e se, muiat a ra ar grafusted — ha dilec'hiañ war gleiz ar grommenn — pa izela ar gwezverek hag ar gwadvec'h dioksidenn garbon ha pa leia ar pH.

bol ◇ **bolus** ◇ **kir g.** Kement tolzennad (boued pe all) o trehentiñ dre ur rann, war draoñ pe war grec'h, eus ar ganol vezhur, sk. : *kir mon, mongir* (Gl. *bol fécal*).

bol alimentaire ◇ **alimentary bolus** ◇ **kir boued** Tolzennad vlot o tisoc'h eus chaokadur hag enhalvadur ur genaouad boued davev da vezañ lonket.

Boll : **passage de** ~ ◇ **Boll's passage** ◇ **forzh b. Boll** Pep hini eus kanoligoù gwehenniñ ur wagrenn ezvorc'hañ, ur wagrenn halviñ pergen, o vont eus kreiz an hogan d'ar ganol enflipezenn.

bolus ◇ **bolus** ◇ **boluz g.** 1 Ensinklad engwazhiennel prim eus ul lia pe eus un aozad dargemm. 2 Prest skingurañ, oberiet en un danvez keflugas d'ar gwiadoù, a louc'her ouzh ar c'hroc'hen e doare ma ve e c'horreenn diavaez plaen hag a-serzh war ahel ar skinoù.

bombe ◇ **bomb** ◇ **tolgenn** b. Ganer skingurañ, ennañ da vammenn un ec'hoder skinoberiek gamma; an ec'hoderioù arveret an aliesañ eo ar c'hobalt 60 hag ar c'heziom 137; troiennoù : *kargañ un dolgenn gant un ec'hoder*; *diounit un dolgenn gobalt ouzh ur c'hankr*.

bombe(-)

• *bombes de téléécésiumthérapie* tolgennoù pellgeziomgurañ • *bombement d'une hernie* argouc'had un avelenn • *faisant bomber la partie postérieure des joues* o reiñ ur stumm koefvet da lodenn adreñ an divjod.

bombésine, GRP ◇ **bombesin, gastrin releasing peptide, GRP** ◇ **bombezin** g., **peptid elloer gastrin** Tetradekapeptid (bet dizoloet da gentañ e kroc'hen ar glesker europat *Bombina bombina*, alese e anvad) bezant er ganol vezhur hag er gouzerc'hvel, da weredoù dezhañ kenraoññ borc'herezh ar c'hreuz hag an ilgreiz, lakaat ar gellenn vestl da argrezañ hag ar c'hember sanvestl-daouzegenn da laoskaat, muiaat ar gwask talmerel; perzh en defe a du 'rall e reolerezh an hormon kreskiñ hag ar glukoz; kavet e vez ivez a-fonn e skevent ar grouell.

bôme ◇ **boom** ◇ **gwilg** g. Treust prenn bourellet festet a-zremm war daou bost a-zerc'h, o talvout d'an embleustrerezh.

Bonnet : **signe de ~** ◇ **Bonnet's sign** ◇ **arouez** b. **Bonnet** Er mavigamm a-wrizienn, ar gouziviad o vezañ gourvezet war e gein, pleget e vorzhed a-serzh, e vez laurus an nesaerezh ha dilaur ar pellaerezh.

Bonnet : **syndrome de P. et Y. ~**, **syndrome du trou déchiré antérieur, syndrome de Jefferson** ◇ **cavernous sinus syndrome** ◇ **azoniad** g. **P. ha V. Bonnet, azoniad an toull fregek, azoniad ar god keviaoek, azoniad Jefferson** Azoniad o kevredañ seizi bloc'hel santadel-loc'hadel an nervenn drigevell (aneraez ar gornsaer ha tiriad nervennoù an divaven, iseraz tiriad an nervenn oftalmek, seizi ar chaokat), seizi nervennoù loc'hañ al lagad (nervennoù aglopenn VI^e, hag a-wechoù III^e ha IV^e), tizhadur an nervenn simpatek trogarotidel (azoniad Claude Bernard-Horner) ha nervenn vras ar garregenn (daeraoññ); azoniad peurliesañ e dianlen un darvoll eus parzh enklouennel ar garotidenn diabarzh.

Bonnier : **syndrome de Pierre Bonnier, syndrome du noyau de Deiters** ◇ **Bonnier's syndrome** ◇ **azoniad Bonnier, azoniad ar gronn a-rakkambr kostezel** Azoniad a arzoder d'un anaf er gronn a-rakkambr kostezel (gronn Deiters), ouzh e ober un nistagmuz emdarzh a-zerc'h pe a-c'hwel, strafuilhoù ar c'hempouez gant turgorzhañ, gwariañ ar bizied yod war gostez an anaf, bouzarded a-wechoù.

borborygme ◇ **borborygmus** ◇ **trouzmek** g. Trouz bourbouilh graet gant dilec'hiadur aezhennoù ha liñvennoù ebarzh ar ganol vezhur, anadenn vonan a-geñver gant loc'hadoù kilblegoù ar pervez, edoug ar c'hoaz-hañ pergen.

bord(-)

• *cellule bordant le cément* kellig loet war lez an diraskorn • *cellule bordante* kellig speurat • *épithélium de bordure* epitelienn riblat • *érosion sans bords* graspad hep ribloù • *le bord libre de la paupière* ribl rez ar valvenn • *le bord supérieur du rocher* ribl krec'h ar garregenn • *les bords d'une ouverture* ribloù un digor • *les bords de l'image du cœur* ribloù skeudenn ar galon • *les cellules qui bordent les capillaires* ar c'helligoù o riblañ ar c'horrwazhied • *les deux bords d'une plaie* div vriell ur gouli • *ligne bordante frontale des cheveux* bevvenn dal ar gwaout.

borderline, limite ◇ **borderline** ◇ **1 kembevenn** b. **2 3 argefin** aa. 1 Bevenn boutin etre daou hennad, daou gleñved, daou zomani, h.a. 2 A-zivout un anaez o tont a-wel gant doareoù 'zo eus un anaez all, sk. : *lovrezh argefin*, etreat d'al lovrezh lepromatus ha d'al lovrezh tuberkuloidel. 3 A-zivout un anaez nad eo ket peurhiniennaet, a savlec'hier betek gouzout etre daou anaez all en askont da heñvelderioù 'zo, sk. : *degouezh argefin* (Gl. *cas-limite, borderline, Sz. borderline case*), bredanaezioù a renker er vevenn etre neuroz ha psikoz, peurgetket ar skizofreniezhoù dezho azonoù neuroz; termen o verkañ muioc'h un arvar en deznaoññ eget ur spesad kleñvedel strizh.

bordure en brosse ◇ **brush border** ◇ **rizenn** b. **vroustek** Diforc'hekadur eus blein kern kelligoù pibell nezek an nefron o c'hoarvezout a vodanoù hir; bennozh dezho e vez kresket a-galz gorread sugañ ar c'helligoù.

1 borgne **2 monophtalme** **3 borgne** ◇ **1 one-eyed** **2 monophthalmic, monopic, cyclopic** **3 caecus (caecum), blind** ◇ **1 born** aa. **2 unlagad** aa., **unlagadek** aa. **3 dall** aa. 1 Dezhañ ul lagad hepken, pe na wel nemet gant ul lagad. 2 Ezvezant ul lagad gantañ a-c'hanedigezh. 3 Adanv o spizañ kanolioù a zo dezho un digor hepken, parzhed e termenoù korfadurezh (Gl. *trou borgne*, PNA *foramen caecum*, Br. *toull dall*) ha kleñvedouriezh (Gl. *fistule borgne*, Sz. *blind fistula*, Br. *fic'h dall*).

borisme ◇ **borisme** ◇ **boregezh** b. Teskad an direzhioù pistriell diwar euvriñ trenkenn vorek pe borat natriom, anezho strafuilhoù stomok, trolern, eritem, troazhproteinegezh.

borne centrale ◇ **central terminal** ◇ **bonn** g. **kreiz, termenell** b. **greiz** Poent kreiz tric'horn Einthoven (e vegoù war an div vrec'h hag ar c'har gleiz) oc'h amparañ an elektrod digas en amdreugadoù kalonvarvezadel unvlein; disi e ve an amdreugad unvlein na c'hoarvezfe gant an elektrod digas argemmad barr ebet diwar ar galon; ar bonn kreiz eo an nesañ d'ar saviad derc'heks; savelet eo dre heptreugañ ar barroù diwar begoù an tric'horn a-dreuz teir harzell 5 000 ohm.

Bornholm : **maladie de ~**, **myalgie épidémique, grippe d'été, pleurodynie contagieuse** ◇ **Bornholm disease, epidemic pleurodynia** ◇ **kleñved Bornholm, kaherost** b. **darreuziat, krezennost** b. **tredizhus** Pore diwar ar virus Coxsackie B, o teraouñ trumm dre ul laur kriz e diaz ar brusok skoilhañ an anal, kevret gant terzhien, kloppennost, a-wechoù gant amgalonennfo, skouarnfo krenn, empenno, o parañ hep arlenad; ouzhpenn ar re roet a-zioc'h e kaver un daouzek anvad all : *glaz tremeniat ar gelc'hspeuren, pilhennfo kaherostus, louetvelfo hep seizi, grip an Diaoul*, h.a.; Bornholm zo an enezenn danat ma voe deskrivet ar c'hleñved evit ar wech kentañ.

Borrelia ◇ **Borrelia** ◇ **Borrelia g.** Genad bakteri eus kerentiad ar *Spirochaetaceae* (troellennek), anaerat ha kleñvedus, gwezher an terzhiennoù arreadek; *Borrelia recurrentis* zo gwezher terzhiennoù arreadek bedvroat diwar laou; gouennadoù all *Borrelia* zo kiriek da derzhiennoù skignek diwar deureug.

borrélios, spirochétoses récurrentes, fièvres récurrentes ◇ **relapsing fever, recurrent fever, spirillum fever** ◇ **borreliozou** l. (g.), **spiroketoziou** l. (g.) **arreadek, terzhiennoù** l. (b.) **arreadek** Poreoù broreuziat, darreuziat pe skignek naous dre brantadoù terzhien ha diderzienn pebeilat, a zo o gwezhioù gouennadoù *Borrelia* treuzkaset gant artropod (laou ha teureug).

bosse sérosanguine ◇ **caput succedaneum** ◇ **koeñvenn b. दौरwad** Daspugnad gwad ha gwadvez endan-groc'h en war gorf un nevezc'haned (war ar c'hloppenn peurliesañ) en ul lec'h a-geñver gant an erload, assuget buan goude ar c'hanedigezh.

bosse-

- *conduit bosselé* kanol volbosek • *portion terminale du canal déférent, irrégulièrement bosselée et dilatée* lodenn dibenn ar san sper, bolbosek ha frankaet dizingal.

botanique

- *d'origine chimique, botanique, biologique* a orin meinell, struzhel, loenell.

bothriocéphale ◇ **bothriocephalus, fish tapeworm, broad tapeworm** ◇ **botriokefal g.** Genad lenkern arvevat, *Diphyllobothrium latum*, eus urzhad ar C'hestod oc'h ebarzhiñ e kanol vezhur an den dre hanterezh pesked dour dous damboazh; deznaouet e vez dre vezañs vioù er mon.

bothriocéphalose ◇ **bothriocephaliosis, diphyllbothriasis** ◇ **botriokefaliaz g., difillobotriaz g.** Teskad erzerc'hadoù kleñvedel diwar arvevadezh an *Diphyllobothrium latum* er vouzellenn voan (amwad, elwenn eozinofil).

botryomycome, granulome pyogénique, granulome télangiectasique ◇ **botryomycoma, botryomycosis** ◇ **granulom g. lineiadel, granulom korrwazhiedusvollel, botriomikom g.** Yoc'henn vihan foel, troadennek peurliesañ, sezet an aliesañ er bizied, en divskouarn pe er brigenn, dec'hanez gant ur poread henek diwar lineiadoù; gwell dilezel an termen *botriomikom* a rafe soñjal en un anaer diwar ur spesad Foue, ar *Botriomiket*; ar re-mañ n'eus ket anezho : dre fazi eo e kredas da zaou c'harveour bezañ o dizoloet e 1897.

botte ◇ **boot** ◇ **heuz g.** Amsteudell o c'hronnañ ar c'har hag an troad.

botte de marche ◇ **walking cast** ◇ **heuz bale, plastrenn vale** Heuz plastr outañ ur seulienn.

botulique : toxine ~ ◇ **botulinum toxin** ◇ **toksin g. botulek** Nervdoksins borc'het gant *Clostridium botulinum* o tevoudañ ar seizi argammedek war ziskenn eus ar c'higennoù dre skoilhañ ouzh dilaosk an aketilkolin er juntad nervenn-kaher; diounezet e vez dre ensinkladurioù lec'hiek en Nervouriezh evit prederiañ ar penngamm andagel, ar malvennandag hag ar strafuilhoù lagadloc'hadel, er Genedouriezh vezegel evit diverkañ ar roufennoù.

botulisme ◇ **botulism** ◇ **botulegezh b.** Pistriboread bouedel lemm hag alies marvus diwar euvriñ toksin *Clostridium botulinum*, bazhell anaerat Gram+ bezant peurliesañ er c'hilhevardon boutet pe er bouedoù mir dishadennet fall; goude ur gounervezh etre un ha tri devezh, e teraou an enneriñ dre strafuilhoù boutin da welout : doñjer, c'hweladoù, laur argreuzenn hag ur goustivadur start ouzh start; da heul ez anad an asikted, seizi an daoulagad, gouseizi strewek ar gouzoug, sec'hded ar genoù, tenndroazh, troazhazdalc'h.

Bouchard : nodosités de ~ ◇ **Bouchard's nodes** ◇ **ozvennoù** l. (b.) **Bouchard** Tevadur ar c'henvelloù etre-oeñsoù diwar usteñv an talpennoù a-geñver gant an artroz henek pe strafuilhoù koazhadel 'zo.

bouche ◇ **mouth** ◇ **genoù g.** Kavenn kemplezh he stumm, argemmus he ment hervez derez displev an divaven, anezhi rann gentañ ar ganol vezhur, o c'hoarvezout a ziv lodenn dispartiet gant ar gwaregoù munsunoù ha dent : ul lodenn dro, rakkamb ar genoù, hag ul lodenn greiz, kavenn ar genoù ent strizh.

bouche-à-bouche : méthode du ~ ◇ **mouth-to-mouth respiration** ◇ **deanalañ genoù-ouzh-genou** Hentenn wenterezh kalvezadel, an deborzher o keffloc'hañ analerezh ar gouziavad diwar-bouez aer e analerezh dezhañ; stouet war dreñv e vez penn ar gouziavad, piñset e zivfron, enc'hwezhed aer en un talm a 15 gwech bep munud; war un dro, diouzh ret, e vez embreget ul leuñvad kalon.

bouchon ◇ **plug** ◇ **stev g.** Hogennad borc'hadoù en ur ganol pe un ec'honnenn gorfadurel.

bouchon de cérumen ◇ **cerumen plug** ◇ **stev mel skouarn, stev kerumen** Hogennad mel skouarn o leuniañ ode diavaez ar c'hleved.

bouchon épidermique ◇ **epidermic plug** ◇ **stev ezkroc'henel** Tolpad kelligoù ezkroc'hen gourc'hennet o stankañ ode diavaez ar c'hleved.

bouchon méconial ◇ **meconial plug** ◇ **stev mekoniom** Antreizh pervez an nevezc'hanidi diwar un daspugnad mekoniom e-barzh ar youlc'h pe ar c'holon a-ziskenn.

boucle ◇ **loop** ◇ **dolenn b.** Lun furmet gant kribennoù ezkroc'hen ar palvoù ha begoù ar bizied, ennañ un triskin.

boucle cardiaque ◇ **ventricular loop** ◇ **gwedenn b. galonel, gwedenn gofigel** Er grouell, kildroenn furmet gant ar ganol arc'hkalon, eeunennek en deroù; argein ar wedenn, a-zehou ent reol, a zitour lec'hienn ar c'hofigoù.

boucle cubitale, radiale ◇ **ulnar, radial loop** ◇ **dolenn a-helmo, a-werzhid** Dolennoù digor a-getep war-du ribl helmo ha ribl gwerzhid an dorn.

boue biliare ◇ **biliary sludge** ◇ **fank g. bestl** Danvezenn c'hludek furmet e-barzh ar gellenn vestl da heul un dreistbec'h kolesterol er vestl, anezhi korstrinkennoù monohidrat kolesterol, bilirubinatin ha haliouù diseurt kalkiom; dre wered ur glikoprotein, ar mukin, ez a ar fank e tolzennoù sonnel, ar *grouan bestl*.

boue calcique rénale : syndrome de la ~ ◇ ◇ **azoniad g. ar fank rizek lounezh** Anaez dibaot, diazon, dinoet dre ar skinluniñ, naous dre ar vezañs, e-barzh ur c'hist a 'l lestr lounezh pe e-barzh kavenn ul lounezhfoeñv, eus un danvezenn liñvel enni strinkennoù haliouù kalkiom en arlug.

boue thermale ◇ **fango** ◇ **fank havel** Danvezenn limouzek a orin struzhel pe veinell, arveret tomm da aozañ kouronkoù, amlennadoù, palastroù.

bouffée de chaleur ◇ **sudden flush** ◇ **bouilhad g. tomm, gwrezenn b., gwridad g.** Strafuilh gwazhiedloc'hadel o tec'han ur santadenn drumm a wrez hag a ruziadur en dremm, kevret alies gant ur c'hwezenn, o c'hoarvezout peurluviañ gant ar maouezed da geñver derou o faouez mizioù.

bouffée délirante ◇ **paranoid state, paranoid reaction** ◇ **kaouad b. ambren, psikoz ambreel lemm** Nodadur trumm erzerc'hadoù psikoz, anezho mennozioù ambreek (kevrinek, heskinek, erotek, meurvreat), enkreuz, drezni, arluz, errizhañ, distreüniñ, mirealoù (baleata, feiadennoù, darwantadoù, argeziadoù emlazhañ) ha direizhoù ar stad hollek (anhun, treutadur).

bougie ◇ **1 bougie 2 candle** ◇ **1 stilh g. 2 kantol b.** 1 Benveg neudheñvel kranennek, hebleg pe reut, a sanker er c'han troazh pe en ur ganol naturel all evit o erc'hwiliañ (*stilh erc'hwiliañ penn-dolok*) pe evit o frankaat. 2 Gwechall, unanenn luc'hskinread damgevatal da luc'hgas ur gantol voutin a 'r c'henwerzh, erlec'hiet outi hiziv ar c'*handela* (sl. *candela*).

bougirage ◇ **bougienage** ◇ **enstilhañ** Kateteriñ diwar-bouez ur stilh, da skouer, sankañ ur stilh er gorzenn glevedel.

Bouillaud : maladie de ~, rhumatisme articulaire aigu, fièvre rhumatismale, polyarthrite aiguë fébrile ◇ **Bouillaud's disease, rheumatic fever** ◇ **kleñved Bouillaud, remm g. lemm an arzoù, terzhienn b. remmel** Kleñved ar vugale hag ar grennoadourion, o tarvezout da heul ur gorank diwar strepokok gwadloeuz A; da arouezioù dezhañ ul liesarzo laurek dilec'hiañ, terzhienn, c'hwezennnoù, ozvennoù kroc'hen, eritem gwrimennek, tizhadoù a 'r flugez, a 'r galon pergen, tuadur d'an adfeilhañ (sl. *cardiopathie rhumatismale*).

bouillie

- *bouillie alimentaire provenant de la transformation du bol alimentaire* yodenn voued o tisoc'h eus danzeadur ar c'hir.

boulimie, hyperorexie, hyperphagie, polyorexie, sitomanie ◇ **bulimia, boulimia, cynorexie, hyperorexie, lycorexia, polyphagia, sitomania** ◇ **gournaon g., gouravez g., bouedvar g.** Stad naon o c'hoarvezout a varradoù ma pleg ar gouzrec'h d'ur c'hoant darluskek da zebriñ hep diraez santad ar gwalc'h; hervez an durc'hadur damkanel e vez graet gant hini pe hini eus an tri zermen : *gournaon* o verkañ an azon, *gouravez* o taveñ da zamkaniezh an avezioù, *bouedvar* oc'h enskrivañ an anaez e rummad ar *barioù*, e-tal ar mezvar, an diedvar, h.a. (sl. *dipsomanie, potomanie*).

boulimique, hyperorexique ◇ **bulimic, hyperorectic** ◇ **1 gournaonek aa., gouravezek aa., bouedvariat aa. 2 gournaoneg g. -eion, gouravezeg g. -eion, bouedvariad g. -ed 3 gournaonel aa., gouravezel aa., bouedvarel aa.** 1 Gant ar gournaon, ar gouravez, ar bouedvar. 2 gouziviad gournaonek, gouravezek, bouedvariat 3 a-zave d'ar gournaon, d'ar gouravez, d'ar bouedvar.

bourbillon ◇ **core** ◇ **gorbenn g.** Hogennad arwenn edañvennek e kreuz un hesked, o c'hoarvezout a lin hag a zrailhoù tonenn marvennet.

bourbouille, lichen tropicus, gale bédouine, miliaire sudorale, prurigo simplex, impétigo miliaire, eczéma aigu disséminé, miliaire rouge ◇ **lichen tropicus, Bedouin itch, prickly heat, heat rash, miliaria, miliaria rubra, red gum, wildfire rash** ◇ **liken g. trovanel, milierenn b. ruz, milierenn c'hwezadel, kravien b. vedouin, kravien eeun, impetigo g. milier, daroued s. lemm strewek, daroued trovanel** Anaez kroc'hen kuñv o reuziañ er broezioù etretrovanel, hogos bepred gant Europiz, diwar steviad ar savnigoù c'hwezpar, naous dre eritem, debren hag un dispuilhad krugennoù ha nozelanoù c'hwezigennek.

bourdonnet ◇ **bolster** ◇ **gwakelig b.** Gwechall, roltad bihan chalpiz a sanked en ur gouli evit spluiañ al lin; hiziv, roltad bihan teltou dishadenn arzalc'het war ur c'hrafaelad surjaniel war-benn gwadkaeañ dre amwaskañ ar gwiaed kellaouek endan-groc'hen.

bourgeon ◇ **bud, process** ◇ **nov g. -où** E deskivadur ar rizehell, furmadur bihan balirek, eginenn un organ pe ul lodenn eus ar c'horf.

bourgeon caudal ◇ ◇ **nov lostel** Termen deskivadurel oc'h aroueziañ an tolpad kelligoù loet e parzh lostel ar rizehell yaouank.

bourgeons faciaux ◇ **facial processes** ◇ **novoù dremmel** Novoù o kendaoliñ da furniñ dremm ar grouell, anezho : an *nov talel* (Gl. *bourgeon frontal*), unek, loet azioc'h ha dirak ar stomodeom; an *dolzenn friel kreizer* (Gl. *massif nasal médian* pe *interne*), unek, o c'haoliñ da amparañ en daou du an *daounov friel diabarzh* (Gl. *bourgeons nasaux internes*); an *daounov friel diavaez* (Gl. *bourgeons nasaux externes*); an *daounov karvanel* (Gl. *bourgeons maxillaires*), loet en daou du d'ar stomodeom hag o vont, e-kerz an diorreadur, da soutañ ouzh an nov talel evit amparañ an divgarvan; an *daounov gavedel* (Gl. *bourgeons mandibulaires*), o vont da gevandiñvañ d'ober ar c'haved.

bourgeons charnus, granulations (d'une plaie) ◇ **granulation tissue, exuberant granulation** ◇ **tiñvennoù** l. (b.) (**ur gouli**) Furmadr paoterus, greunek, ruz, blot, gwadus, o tinodiñ ent vonan e deun ur gouli war gleizennañ, gantañ neuz korrshelladel ur granulom.

bourgeons du goût, boutons gustatifs ◇ **Schwalbe's corpuscles, taste buds, taste bulbs, calculi gustatorii** ◇ **bozhigoù** l. (b.) **an tañva** Elfennoù eus organ an tañva, korfigoù munut loet en epitelienn begennoù kalirek ha kabellek an teod, dezho neuz ur voutailh, diouzh un tu kreizet war dibennoù an neuron eus kangrenn izelañ an nervedenn deod-gargadenn, diouzh an tu all digor e kavenn ar genoù dre ganol an tañva.

bourgeon-

- *classe de champignons se reproduisant par bourgeonnement* kevrennad foue o ouennañ dre vroñsañ • *séquestrations développées à partir d'un bourgeon bronchique surnuméraire* amskaradoù diwar un nov bronkezel dreistniver • *situé à l'apex du bourgeon d'un membre* loet e kern nov un ezel • *spores fongiques naissant par bourgeonnement* spor ar foue o tiwanañ dre vroñsañ • *tumeur bourgeonnante* yoc'henn diñvennus.

bourrelet cotyloïdien ◇ (PNA) **labrum acetabulare** ◇ **erien g. ar bodenn** Stirvigorn gwalennek war drobarzh ar bodenn.

bourrelet génital ◇ **genital swelling** ◇ **koagenn b. c'hanadel** Er grouell, furmadur hirvoan balirek, egin ar gousac'h pe ar muzelloù bras.

bourrelets aorticulonaires ◇ **bulbar ridges** ◇ **kribennoù** l. (b.) **ar god** Er grouell, furmadurioù e stumm linennoù troellennek eus ar mezenkim endan-enkalonenn o tec'han, dre gendeuziñ, tilhennadur ar god talmerel.

bourrelets d'occlusion ◇ **bite-rims, occlusal rims, record rims** ◇ **erienoù keharzañ** Bloc'hoù koar ebarzhet er genoù etre karvan ha gaved war-benn anaout ar c'heñverioù el lakadur keharz etre an dent bezant pe munsunoù an dent ezvezant.

bourrelet

- *bourrelet fibreux se développant sur une cicatrice* andell stirek oc'h evodiñ diwar ur gleizenn • *bourrelet transversal situé le long de la partie craniale du stomodœum* nov e rezh un erien diadrez loet a-hed parzh a-glopenn ar stomodeom • *œdème de la conjonctive oculaire formant un bourrelet translucide rose ou rouge vif pouvant faire hernie à travers la fente palpébrale* gouliñv eus kevresae al lagad dezhañ neuz un andell dreuzluc'hus roz pe ruz kel oc'h ogañ a-wechoù dre faout ar malvennoù.

bourse séreuse ◇ **bursa** ◇ **yalc'h b. levrus, yalc'h irus** Kennenn genglenel o wiskañ ur gavenn gloz hag o vorc'hañ enni ul liñvenn levrus (iruzenn); roll ar yalc'h levrus eo aesaat ar riklañ d'ar stirennoù ha d'ar c'higennoù; dre fazi e vez graet anezhi La. *bursa mucosa*.

bout

- *anastomose bout à bout* dasforzhañ penn-ouzh-penn, dasforzhañ dre bennegiñ.

bouton ◇ **pimple** ◇ **porbolenn b.** Termen deskivadurel oc'h aroueziñ nep tagos bihan o valirañ diouzh ar c'hroc'hen : krugenn, burbuenn, c'hwezigen, filboc'henn, ozvenn.

bouton aortique, arc (radiologique) supérieur gauche ◇ **aortic knob** ◇ **tor g. aortek, gwareg b. krec'h kreiz** Skeudenn skinlun ribl kleiz an aortenn.

bouton aortique : double ~ ◇ **double aortic knob** ◇ **tor aortek doubl** Trebad an div wareg aortek rizhellek dehou ha kleiz, o neuziañ war skinlun ar brusk un eil tor aortek en tu dehou.

bouton d'Alep, bouton d'Orient, bouton de Biskra, bouton d'un an, bouton du Nil, bouton de Delhi, bouton de Gafsa, bouton des pays chauds, bouton des Ziban, chancre du Sahara, mal des dattes ◇ **oriental sore** ◇ **porbolenn ar Reter** Kleñved tredizhus, broreuziat er rannbarzhioù tomm, naouus dre un dispuilhad krugennoù ruz o treiñ e gouliezoù dourasennus, da wezher dezhañ ur brotozoenn, *Leishmania tropica*, trezoget gant un amprevan, *Phlebotomus papatasi*.

bouton d'huile, élaïconiose ◇ ◇ **ouleuflegezh b.** Bolc'hennfo aknevanek o tizhout ar vetalwezhourion diwar wered an uloc'h hag an eoul.

bouton de Boma ◇ **Boma ulcer** ◇ **gouliez b. Boma** Tonennezkroc'henfo krugennc'hwezigennek oc'h emdreñ dre c'hraspiñ ha sec'hañ, a ve e wezher *Streptococcus versatilis*.

bouton du désert ◇ **desert sore, tropical sore, veldt sore** ◇ **angreizh b. an dezerzh** Anaf kroc'hen, a-wechoù liesel, dianav e arbenn, o teraouiñ dre ur c'hwezigen laurus o fregañ en ur leuskel ul liñvenn arvelen, o lezel war he lerc'h ur c'houliez a ya war astenn tamm ha tamm ha tizhout ar gwiad kellaouek endan-groc'hen hag a wechoù ar c'higennoù.

Bouveret : maladie de ~, tachycardie paroxystique supraventriculaire, tachycardie paroxystique nodale, tachycardie paroxystique essentielle ◇ **paroxysmal nodal tachycardia** ◇ **kleñved Bouveret, kalonustead g. grezvarrek us-kofig, kalonustead grezvarrek klomel, klomustead g. grezvarrek, kalonustead grezvarrek hennadek** Anaez naouus dre varradoù arreat o padout etre un nebeut munudoù ha lies eurvezh ma lamm ar galon herrek ha reoliek (200 ha muioc'h dre vunud); kemma lakaer etre ar c'*halonustead grezvarrek us-kofig* hag ar c'*halonustead grezvarrek kofigel*.

bovin

- *bacille d'origine bovine* bazhell a orin buel.

Bowman : capsule de ~ ◇ **Bowman's capsule** ◇ **koc'henn b. Bowman** Furmadr pellennek o c'hronnañ toupenn ar bloueig, ouzh e ober un diazkennenn goleet en diabarzh gant ur gwiskad kelligoù epitelel hag en diavaez gant ur gwiskad gwiad

kenglenel lodek e gwiad entremezel al lounezh; a-gendalc'h emañ epitelienn ar goc'henn, pe epitelienn speur, gant epitelienn korrwazhied ar bloueig, pe epitelienn flugez.

Bowman : glande de ~ ◇ PNA glandula olfactoria, **Bowman's gland** ◇ gwagrenn b. **Bowman**, gwagrenn ar c'hwasha Gwagrenn ezvorc'hañ pibellhoginek loet e-barzh tonenn ar glaourgenn c'hwasha, o skuilhañ war c'horre an epitelienn c'hwasha ul liñvenn dileizhus d'an danvezennou frondek.

Bowman : membrane de ~, lame élastique antérieure, membrane basale antérieure, lamina limitans anterior corneae ◇ **Bowman's membrane** ◇ kennenn b. **Bowman**, diazkennenn b. araok ar gornsaes, lavnenn vevenn araok (ar gornsaes) Lienenn unvan etre 7 ha 12 µm tevder, loet dindan epitelienn araok ha glet ouzh stroma ar gornsaes.

boxeurs : fracture des ~ ◇ **boxers' fracture** ◇ torr g. ar vokserion Torr war bleañ eus gouzoug pempet askorn ar c'hreizdorn, paot ha hep grevusted.

Boyden : épreuve de ~, repas de ~ ◇ **Boyden's meal**, fatty meal ◇ proud g. **Boyden**, pred g. **Boyden**, pred druz E sell d'un imbourc'h skinluniñ, e lakaer ar gouziviad da evrñ ur pred lipidek (3 melen vi, 3 loaiaid voued dienn laezh fresk) war-benn lakaat ar gellenn vestl bet demeraet diagent da argrezañ ha da skarzhañ he endalc'had endra denner ur steudad skeudennoù.

Bracht : manœuvre de ~ ◇ **Bracht's method** ◇ kefleñvad g. **Bracht** Kalvezder gwiliouderezh e degouezh erload ar c'hoazez, pa vez ar penn da ziweshañ hag ar c'hilpenn a-raok, anezhañ gorren korf ar grouell trema speur kof ar vamm.

brachialgie, **brachionalgie** ◇ **brachialgia** ◇ **brec'host** b. Nervost plezhad ar vrec'h, azoniek pe hennadek, o c'hoarvezout neuze a c'hrezvarrou gant entremezioù dilaur.

brachy-œsophage ◇ **brachyœsophagus** ◇ **ished g. treizher**, **treizherished g.** Berrded ezreol, ganedigel pe arzeuat, eus an treizher, naouus dre vezañs un darn eus ar stomok e-barzh ar brusok.

brachy-onychie ◇ **brachyonychia** ◇ **ished ivinoù**, **ivinished g.** Berrded ezreol an ivinoù.

brachybasie ◇ **brachybasis** ◇ **berrgammed g.** Kerzhed a gammedoù berr.

brachybasique ◇ **brachybasic** ◇ **1 berrgammedek aa. 2 berrgammedeg g. -eion 3 berrgammedel aa.** 1 Gant ar c'herzhed a gammedoù berr. 2 Gouziviad ar berrgammed. 3 A-zave d'ar berrgammed.

brachycéphalie ◇ **brachycephalia** ◇ **1 krennbennegzh 2 ished klopenn**, **klopennished g.** 1 Stumm klopenn gant gouennnoù tud, an hed brasañ anezhañ o vezañ etre an 8 hag an 9 eizhvedenn eus e led. 2 Disneuiziad ar c'hlopenn diwar soutadur rakkoulz ar mellezoù (sl. *acrocephalie*, *craniosynostose*, *microcephalie*).

brachyclinodactylie ◇ **brachyclinodactyly** ◇ **ished ha fle g. ar bizied** Kammneuiziad un pe lies biz dorn pe troad, anezhi kevret oeñsished ha bizfle, a-geñver peurvuiañ gant iswe digempazhek an oeñsoù krenn.

brachydactylie ◇ **brachydactyly** ◇ **ished ar bizied**, **bizished g.** Berrded ezreol ar bizied, hêrezhel ha treuzkaset er mod trec'hek.

brachygnathie ◇ **bradygnathia** ◇ **ished aven**, **avenished g.** Berrded un pe an div aven (*karvanished*, *gavedished*).

brachymétropie ◇ **brachymetropia** ◇ **istihed g.** Stad al lagad ma kouezh en araok d'al luc'hsae skeudenn an ergorenn en trafell, tro an isstiwel enta.

brachymorphe, **brachytypique** ◇ **brachymorphic** ◇ **krennstumm aa., krakrizh aa., krakrizhek aa.** Gant ur stumm berr ha tev, krapok.

brachymyomie, **raideur juvénile** ◇ **kaherished g., reuted b. yaouerel** Azoniad naouus dre verrded ar c'higennoù, oc'h erzerc'hañ d'an oad a 6 pe 7 vloaz, o tevoudañ reuted an izili hag isheled ar fiñvoù.

brachyolmie ◇ **kefished g.** Berrded ar c'hef a-geñver gant issav ar mellennoù diwar blatispondiliezh.

brachyphalangie ◇ **brachyphalangia** ◇ **ished an oeñs(où)**, **oeñsished g.** Berrded ezreol un pe lies oeñs diwar anpar pe iswe; hervez an oeñs tizhet e komzer eus ished an oeñs nezek (*nezoëñsished*), ished an oeñs krenn (*krennoëñsished*), ished an oeñs pellek (*pelloëñsished*).

brachypnée ◇ **brachypnoea** ◇ **berranal g., isheled g. an anal**, **analished g.** Berrded heled an analañ.

brachyskélie, **microskélie** ◇ **brachyskelia** ◇ **eskerished g.** Berrded ezreol an divesker.

brachysyndactylie ◇ **symbrachydactylia** ◇ **ished hag anskar g. ar bizied** Kammneuiziad ar bizied, re verr (bizished) ha soutet kenetrezo (bizanskar).

brachythérapie, **curiethérapie endocoronaire** ◇ **brachytherapy** ◇ **neskurañ**, **kurigurañ enkurunere** Skinata diastok en oaled un dalmerenn guruner dre skinoù gamma pe beta evit dizarbenn adfeilh un isvoll.

bradyarthrie, **bradyalalie** ◇ **bradyarthria** ◇ **istead g. kevaotañ**, **kevaotistead g.** Strafuilh ar c'homz, anezhañ un ec'hodiñ skoataet, unton hag arouarek, azon nerval peurliesañ (sl. *anarthrie*, *dysarthrie*).

bradyarythmie ◇ **bradyarrhythmia**, **irregular bradycardia** ◇ **isteadmigorvez g., kalonistead g. direoliek** Strafuilh e korvez ar galon, steudadoù lammoù gorrek kenan o pebeilañ gant steudadoù herrekoc'h evito da vezañ gorrekoc'h c'hoazh eget reol.

bradycardie ◇ **bradycardia** ◇ **istead kalon, kalonistead** Gorregezh lammoù ar galon dindan 60 / min, bonan pe gleñvedel, a orin kentezel, klomel pe devoudet gant un tol c'had kentez-kofig.

bradycinésie, bradykinésie ◇ **bradykinesia** ◇ **istead fiñval, fiñvistead** g. Gorregezh ar fiñval diarvenn (pe diarvenn ha diarzoug evit aozerion 'zo), a stader e kleñved Parkinson hag en azoniadoù dianempennfo.

bradydiastolie ◇ **bradydiastol** ◇ **uspad** g. **an diastol, diastoluspad** g. Hiraat ar paouez diastolel.

bradyesthésie ◇ **bradyaesthesia** ◇ **istead eraeziñ, eraezistead** g. Gorregezh an eraeziñ.

bradykinine ◇ **bradykinin** ◇ **bradikinin** g. Polipeptid o c'hoarvezout a 9 amindrenkenn (nonapeptid), bezant er pladanoù, enaozet er plasma gwad diwar un diaraoger, ar bradikininogen, dindan delanvad ar c'hallikrein.

bradylogie ◇ **bradylogia** ◇ **istead deluzañ, deluzistead** g. Prezeg gorrek, dastroc'het gant paouezioù, a-geñver gant ur strafuilh en arc'hwelioù nerverl uhelañ pe en dezeverezh.

bradypepsie ◇ **bradypepsia** ◇ **istead koazhañ, koazhistead** g. Gorregezh ar c'hoaz-hañ.

bradyphagie ◇ **bradyphagia** ◇ **istead debrisñ, debristead** g. Gorregezh an debrisñ.

bradyphasie, bradyphémie ◇ **bradyphasia, bradyphemia** ◇ **istead komz, komzistead** g., **istead ezluzañ, ezluzistead** g. Anvad genadel ar furmoù gorregezh en eztaoliñ dre gomz.

bradypnée ◇ **bradypnoea** ◇ **istead analañ, analistead** g. Gorregezh an analañ.

bradypsychie, viscosité psychique ◇ **bradypsychia** ◇ **istead ar bredarc'hwelañ, bredistead** g., **gludegezh** b. **vred-el** Gorregezh arc'hwelerezh ar bred, azon kentañ alies eus loezadur ar genskiant, azon ivez eus al labanded pe eus an displeberad envediel.

bradyrythmie ventriculaire ◇ **slow idioventricular rhythm** ◇ **istead kofig, kofigistead** g. Gorregezh korvez argrezadoù ar c'hofig (*poulzistead pad*).

bradysinusie ◇ **sinus bradycardia** ◇ **istead kentez, kentezistead** g., **kalonistead godel, godistead** g. Strafuilh korvez ar galon, ma vez gorrekoc'h korvez ar c'hentez eget korvez ar c'hofig.

bradysphygmie ◇ **bradysphygmia** ◇ **istead ar poulz, poulzistead** g. Gorregezh ar poulz pe diwar gorregezh lammoù ar c'hofig, pe diwar argrezadoù kofig re wan da dreiñ e poulzadoù (dreistsistolou).

brai : **maladie du ~** ◇ **tar acne** ◇ **kleñved an ter, akne** b. **an ter, teregezh** b. Kleñved micherel diwar dornata an ter ha dilerc'hioù strilhadur an ter danvezet d'ober biketez : tanaill, pikadurezh, loskadurezh en dremm, akne derel, darvoudoù kroc'hen henek grevus a-wechoù (kankroù).

brancard, civière ◇ **stretcher** ◇ **kravazh** g. (l. : **krivizhier**) Framm o c'hoarvezout eus ul lien stignet etre div c'harenn genstur, o talvouet da zezougen ur c'hlañvour pe ur gloazed gourvezet.

branch-

- *artère et ses branches* talmerenn hag ar barroù diouti
- *bloc de branche* tol c'had barr
- *branche ascendante de l'onde S* barr-sevel ar wagenn S
- *branche collatérale d'une artère* barr kengostezel un dalmerenn
- *branche de la médecine* skourr a 'r Vezekniezh
- *branches artérielles pulmonaires* barroù talmerel a-skevent
- *branches du faisceau de His* barroù an hordenn gentez-kofig
- *branches montantes du maxillaire inférieur* barroù ar c'haved
- *conducteur non branché* reell diskourr
- *mésobranchial, poches branchiales, fentes branchiales* mezvrenkel, yalc'hoù brenkel, boulc'hoù brenkel
- *premier arc branchial* kentañ gwarez vrenkel
- *voie biliaire accessoire branchée en dérivation sur la voie biliaire principale* an adforzh vestl skourret en amdreug ouzh ar bennforzh vestl.

branchiome ◇ **branchioma** ◇ **brankiom** g. Yoc'henn yud eus ar gouzoug o tedeiñ herrek ha marvus ; tennañ a ra he anvad eus ar c'houlakadenn dilezet hiziv ez evode diwar dilerc'hioù rizhellel ar gwaregoù brenkel.

Brand : **réaction de ~** ◇ **Brand's test** ◇ **dazgwered** g. **Brand, proud** g. **Brand** Dazgwered o reiñ an tu da ziournat strafuilhoù kennevid an amindrenkennoù : dinoet e vez ar vezañ eus amindrenkennoù sulfuret (kistin, homokistin) dre al livrezh ruz a zeu gant an troazh pa azdoder outañ kianidenn galiom ha nitroprusiat natriom.

Branham : **phénomène de ~, signe de ~** ◇ **Branham's phenomenon, Branham's sign** ◇ **anadenn** b. **Branham, arouez** b. **Branham** Pa stanker ur fic'h talmerenn-gwazhienn dre bouezañ warnañ a-ziavaez, e c'horreka ar poulz, e vuia ar gwask diastolel, e leia ar c'has sistolel, anadenn na c'hoarvez nemet pa vez ur fic'h a gavnez bras etre div wazhienn dev.

bras

- *chromosome dont la forme ressemble à un V renversé, avec un bras long et l'autre très court* kromozom dezhañ stumm ur V eilpennet, gant ur vrec'h hir hag ur vrec'h berr tre
- *chromosome dont les bras sont pratiquement de même longueur* kromozom a zo par pe dost e vrec'hioù
- *délétion du bras long du chromosome 22* dilead brec'h hir ar c'hromozom 22.

bras tendus : **épreuve des ~** ◇ **arm deviation test** ◇ **proud an divvrec'h astennet** Embregad evit lakaat war wel un divigad loc'hadel diheverzh a hent all en izili krec'h ; ar gouziaviad o vezañ en e c'hoarvez war e gein pe, gwell, en e goazez, e zivvrec'h astennet dirazañ a-serzh war e vrusk, e zaoubalv tro ouzh traoñ pe tal ouzh tal, e stader, en un tu, e c'hoarvez d'e vizied krommañ tamm ha tamm, d'e vrec'h kouezhañ ha d'e zorn palvstouñ.

brèche

- *brèche vasculaire* boulc'h er gwazhied, freg er gwazhied
- *quand il y a des brèches vasculaires* pa vez freged ar gwazhied.

bredouillement ◇ **stammering** ◇ **balbouzerezh** g. Bec'h o verañ steuñvenn ar gomz, peurgetket o reoliñ padelezh an ec'hadoù hag ar paouezioù, mouezhiad kentañ un unvez distilhoù o tont da zarveskañ gant mouezhiad diwezhañ an unvez a-raok.

bref

• *bruit sec et bref* trouz krenn ha berrbad • *contraction musculaire brève* argrezad berrbad.

Brenner : **tumeur de ~**, **oophorome** ◇ **oophoroma folliculaire** ◇ **yoc'henn** b. **Brenner**, **ooforom** g. Yoc'henn guñv eus ar vierrez, sonnel pe gistek, ouzh he ober ur gwriad kenglenel paoterek, stirek pe stirwerek, strewet ennañ enezigoù epitelet leun pe gavannek.

bréviligne, brachysome ◇ **brevilineal** ◇ **berrizilik** aa. A-zivout ur rizh hiniennoù naous dre verded o izili ha hirded o c'hef.

bricole anglaise ◇ **English breast-harness** ◇ **siveleñ** b. **saoz** Harnez kroaziet etre ar plankenoù skoaz, araez da skourrañ un osod arvec'h.

bride ◇ **adhesion, bridle** ◇ **nask** g. 1 Furmadur stirek ezreol o tilhennañ kavenn ur pugnez pe ur gavenn naturel da heul ur gwezh surjaniel. 2 F urmadur stirek o tec'h an grizadur ur gleizenn groc'henn.

bride congénitale ◇ **congenital bridle** ◇ **nask ganedigal** Lurell stirek ezreol, kammneuziat, stignet etre daou askorn pe etre daou benn kenveillañ, dreist holl en ilin, e poull an arzell, en ufern, o harzegeañ ar fiñval.

bride

• *section de bride* naskenbenañ.

bridge ◇ **bridge** ◇ **briv** g. Dentosod oc'h amsaviñ un pe lies dant, anlenet ouzh an dent en daou du d'ar bouc'h.

bridge de contention ◇ **bridge and dental stabilization** ◇ **briv stabilaat** Briv a zo e amkan, ouzhpenn amsaviñ dent ezvezant, eren ouzh dent chomet sonn dent aet distrantell gant ar parodontoz hag e se diloc'h hekaat ar re-mañ.

brillance énergétique, luminance énergétique ◇ **energy brilliancy** ◇ **gremmsked** g. Gremm skinek ec'hodet e-barzh an unanenn ec'hongorn gant ur vammenn a unanenn c'horread; dewerzhet e vez e *watou dre steradian dre vetr karrez* (atalad mentawouriel : MT⁻³).

brillance visuelle : **sensation de ~**, **coefficient d'efficacité lumineuse** ◇ **coefficient of luminous efficiency** ◇ **gwel-sked** g., **gwezhiader** g. **luc'hefedusted** Braster andennadel, hep atalad mentawouriel enta, dewerzhet evel rannad gremmsked ul luc'h dave (gwenn peurliesañ) dre c'hremmsked ul luc'h unliv o tec'h an an santadenn; emañ ar gwel-sked e dalc'h trohed al luc'h ha naousterioù al luc'hsae (argeskediñ, argeflivañ) (sl. *adaptation à la lumière, adaptation colorée*).

brin ◇ **strand** ◇ **gwidenn** b. -où Digorvell amparus d'an trenkennoù nukleek (sl. *désoxymononucléique, monocaténaire, bicaténaire*).

Brissaud et Sicard : **syndrome de ~**, **hémispasme facial alterne** ◇ **Brissaud-Sicard syndrome** ◇ **azoniad Brissaud-Sicard, ledandag dastuat an dremm** Ledandag an dremm gant ledseizi a-eiltu, azonus d'un anaf e lodenn draoñ ar pont e tu an andag.

Broca-Sulzer : **phénomène de ~** ◇ **Broca-Sulzer phenomenon** ◇ **anadenn Broca-Sulzer** Evit skedoù dreist 60 nit, e hañval un hevelep mammenn bezañ skedusoc'h pa vez gwelet en ur par berr eget p'he seller e-doug un amzer hiroc'h.

broche ◇ **pin** ◇ **ber** g. -ioù Garenn vetal hir ha begek arveret er surjianerezh korf-eunañ evit kesteudañ an eskern e torroù 'zo pe evel poent krap ar stleug sach-astenn.

Brock : **opération de ~**, **valvulotomie pulmonaire** ◇ **Brock's operation** ◇ **oberatadenn** b. **Brock**, **trapigenbenañ a-skevent** Gwezhiadenn surjianerezh a galon serr evit frankaat un isvill eus gwask an dalmerenn a-skevent diwar gempegad ar sac'helloù kornloarek : sankañ a reer a-dreuz da speurenn founilh ar c'hofig dehou trapigenbenerioù a ventoù war gresk ha, da c'houde, ur frankaer; dilezet eo bet an oberatadenn-se e gounid an *trapigenbenañ a galon digor gant skoevamred*.

Brodq : **pseudopelade de ~**, **état pseudopeladique** ◇ **pseudopelade, alopecia atrophicans** ◇ **gaoubeliad** g. **Brocq, stad c'haoubeliad** Diwaoutad kleizennel a dachadoù bihan paot o treiñ dre zaskantañ e plakadoù ledan; anaez pe kentael, pe eilvedel d'ul liken plaen, d'ul lupuz eritematose pe d'ur skleroderma.

Brodie : **abcès de ~** ◇ **Brodie's abscess** ◇ **pugnez** g. **Brodie** Seurtad askornfo henek diwar c'harvevion lineiat o tec'h an e diabarzh un askorn (askorn berr pe ardalpenn un askorn hir) furnidigezh ur gavennad lin enni un pe lies amskar engroc'h; er skinkluniñ ez anad evel un tachad sklaer gant ur wrimenn fetis.

bromatologie ◇ **bromatology, food science** ◇ **Bouedoniezh** b. Skiant ar bouedoù; studi an danvezennoù diouzh savboent ar magañ; da ziforc'hiñ diouzh ar *Vouedouriezh* (Gl. *diététique*), ar *Vezhuroniezh* (Gl. *science de la nutrition*), ar *Vezhurouriezh* (Gl. *pratique de la nutrition*), an *Hevlezouriezh* (Gl. *gastronomie*).

brome ◇ **bromine** ◇ **brom** g. Elfenn gimiek a niverenn atom 35, a arouez Br, divetal eus kerentiad an halogenoù, heñvel e vonedigezh kimiek ouzh hini ar c'hlor; kontamm taer er stad anked; oksider o tedaolliñ *bromidennoù* (Gl. *bromures*) dre gediañ gant un niver bras a elfennoù.

bromesulfoneptaléine (BSP) : **test à la ~**, **épreuve à la ~**, **clairance à la ~** ◇ **bromosulfophtalein test, sulfobromoph-talein test** ◇ **prouad** g. ar **bromosulfophtalein (BSP)**, **dizeul** g. ar **bromosulfophtalein** Prouad amkanet da imboure'hiñ arc'hwel degorzhañ an avu; goude sanket dre ar wazhienn un doead BSP diouzh ar feur 5 mg / kg (pe 150 mg / m² gorread korf), e vez delenet buan an danvezenn gant an avu ha neuze ezvevennet e ser ar vestl; goude 15 min, ent reol e vez ar gwadvec'h dindan

25 % eus an doenad deroù, goude 45 min dindan 5 %; er pleustr e spisaer aesoc'h barr karzhañ ar plasma gant parenkim an avu dre savelañ dizeul azrannel ar BSP, reol etre 15 ha 17 %; leiaet e vez gant ar skorted avu.

bromhidrose, bromidrose, osmidrose ◇ **bromhidrosis** ◇ **mouc'hwez** g. Anaez naouus dre ur c'hweziñ flaeius, hollek pe lec'hiek (treid, divgazel), he- pe usvorc'hek.

bromisme ◇ **bromism** ◇ **bromegezh** b. Pistriadur henek gant ar brom pe gant kediadoù ar brom.

bromocriptine ◇ **bromocriptine** ◇ **bromokriptin** g. Danvezenn deveret eus ar pigell, heñvel he gweredoù ouzh re an dopamin; prolaktindolc'her eo hag he diounit a reer evel laezhastaler; erskrivet ouzh an azoniad laezhver-mizanliñv, ar prolaktinomou, ar geurvleñchegezh ha kleñved Parkinson; efedus e ve e degouezhioù 'zo a anfruezhusted.

bromodermie, bromide ◇ **bromoderma** ◇ **bromoderma** g. Darvoudoù kroc'hen (toksiderma): debrom, eritem, tanijennoù diwar ar pistriadur gant ar brom hag e gediadoù.

bromures ◇ **bromides** ◇ **bromidennoù** Haliou alkaliek an drenkenn vromhidrek, *brom-idennoù natriom* (NaBr) ha *kaliom* (KBr) pergen, diounezet gwechall dre euvriñ evel gwezherioù hezus, huneiat, enepkridek; da notañ perzhioù ar *vromidenn etil* evel dieraazer.

bronch-

• *arbre bronchique* skoultrig ar bronkez • *bronchioles respiratoires* korrvronkez anañ • *bronchioles terminales* korrvronkez dibenn • *bronchoconstrictif* bronkezstrisshaus • *désordres bronchopulmonaires* strafuilhoù bronkez-skevent • *tumeur intrabronchique* yoc'henn enbronkezel.

bronche de drainage ◇ **draining bronchus** ◇ **bronkezenn wehenniñ** Bronkezenn a c'hoarvez drezi karzhidigezh endalc'had liñvelaet un annon pore (diwar dorzhellegezh, pugnez, breinged) eus parenkim ar skevent.

bronchectasie, bronchiectasie, dilatation des bronches ◇ **bronchiectasis** ◇ **usvoll g. bronkez, bronkezusvoll g., bolc'h-adur g. ar bronkez** Muiadur kavnez ar bronkez, hag eñ ingal (*usvoll kranennek*), pe e rezh un aridennad bolc'hadennoù (*usvoll bolbosek*), pe e rezh ur volc'hadenn e dibenn ar vronkezenn (*usvoll bazoulek*); kevret e vez gant distruj framm kaherek ha dastennek ar bronkez hag ur bronkezver henek.

bronches ◇ **(PNA) bronchi**, (u. : **bronchus**) ◇ **bronkez s.** Aerganolioù etre ar vrian hag al logigoù skevent.

bronchio-alvéolite ◇ **vesicular bronchiolitis** ◇ **bronkez-logigfo** g. Tanijen e skoultrennadur diwezhañ ar bronkez hag el logigou skevent stag outo, naouus dre usvorc'h ar glaour, gouliñv ha darwazh an donenn.

bronchioles ◇ **bronchioles, bronchioli** ◇ **korrvronkez s.** Skoultrrennoù diwezhañ ar bronkez, hep migorn en o speur, dezho un treuzkiz ≤ 1 mm.

bronchiolite ◇ **bronchiolitis** ◇ **korrvronkezfo** g. Tanijen ar c'horrvronkez, lemm pe henek, naouus dre an usvorc'h glaour diwar drewe an epitelienn riblat, steviadur ar forzh ha tanijen al logigoù; ur furm c'hrevus dibaot eo ar *c'horrvronkezfo anforzhus* (Gl. *bronchiolite obliterante*), anezhañ aloubidigezh ar forzhioù gant ur gwiad greunennek o treiñ e fibroz war var da zevoudañ an ankalez analadel hag ar marv.

bronchiolyse ◇ ◇ **bronkezluez** g. Anaf distrujus e speur ar bronkez; *bronkezluez usvullus* (Gl. *bronchiolyse ectasiente*) a reer eus bolc'hadur ar bronkez da heul linadurioù hirbad.

bronchite ◇ **bronchitis** ◇ **bronkezfo** g. Anvad rumm evit nep tanijen e glaourgen ar bronkez.

bronchite aiguë ◇ **acute bronchitis** ◇ **bronkezfo lemm** Tanijen ar bronkez naouus dre zarwazh ha gouliñv an donenn gant tregen leukokit, glaourusvorc'h devoudus d'ur paz kraostus.

bronchite capillaire ◇ **capillary bronchitis** ◇ **bronkezfo brigerel** Tanijen lemm skoultrennadur diwezhañ ar bronkez.

bronchite chronique ◇ **chronic bronchitis** ◇ **bronkezfo henek** Keal reuziadoniel dec'heriet evel henn: nep azoniad anezhañ ur paz, padek pe spanaus, kevret gant usvorc'h ar bronkez (ha n'eo ket dre ret ar c'hraostañ), o c'hoarvezout e-doug tri mizvezh, hep ma ve a-undalc'h, bep bloaz ha daou vloaz lerc'h ouzh lerc'h da nebeutañ.

bronchique chronique obstructive ◇ **chronic obliterative bronchitis** ◇ **skeventfo henek stevius** Bronkezfo eus rumm ar *bronkezskeventadoù henek stevius*, naouus dre ar paz hag ar c'hraostañ e-doug lies miz eus ar bloaz war dri bloaz da nebeutañ (despizadur reuziadoniel); an isvoll foel pe fibroz eus ar c'horrvronkez flipezenn ha dibenn a leia gwentadur ar skevent war var da zedreñ en emfizem skevent hag er skorted analadel.

broncho-aspiration, drainage bronchoscopique ◇ ◇ **suc'hañ bronkez, bronkezsuc'hañ, gwehenniñ bronkezwereadel** Araezad prederiañ al linadurioù bronkez ha skevent, anezhañ, goude desezañ ur fibroskop, suc'hañ borc'hadoù ar bronkez.

broncho-émollient ◇ ◇ **1 bronkezlaoskaus aa. 2 bronkezlaoskaer g. -ioù** 1 O tiargrezañ kaherioù ar bronkez. 2 Lia bronkezlaoskaus.

broncho-emphysème ◇ **bronchoemphysema** ◇ **emfizem g. bronkezel, bronkoemfizem g.** Anaez analadel o teraouiñ dre ur bronkezfo gant korrvronkezfo ha bronkezver, o tedreñ dre steviad ar c'horrvronkez, frapadoù logigfo, tizhadoù speur ar brusk hag ar gelc'hspeuren, o vont betek ar skorted analadel grevus, an anoksiezh hag alies skorted dehou ar galon.

bronchobiopsie ◇ ◇ **bevsav v. & g. bronkez, bronkez-vevsav v. & g.** Erlemel un tamm glaourgen bronkez dindan engweliñ.

- bronchocèle** ◇ **bronchocele** ◇ **1 bozhell b. vronkez, bronkezvozhell b. 2 aervozhell b. vronkezel, bronkezaervozhell b.** 1 Bolc'hadenn lec'hiek war ur vronkezenn, lec'hiet en argrec'h un isvoll bronkez diwar ur c'hankr pe an dorzhellegezh, leun gant lin (*linvozhell*, Gl. *bronchopyocèle*) pe gant glaour (*glaourvozhell*, Gl. *bronchomuocèle*). 2 Yoc'henn aezhel ar gouzoug kehent gant ur vronkezenn.
- bronchoconstriction** ◇ **bronchoconstriction** ◇ **bronkez-strishaat** Argrezañ kigennoù ar bronkez ha dre se leiaat kavnez ar re-mañ.
- bronchodilatateur** ◇ **bronchodilator** ◇ **1 bronkezfrankaus aa. 2 bronkezfrankaer g. -ioù** 1 O vuiaat kavnez ar bronkez; 2 Danvezenn nervwezhus dezhi perzhioù bronkezfrankaus, evel an teofillin hag ar betafruaerioù, liaoù arveret evit prederiañ an astma.
- bronchodilatation** ◇ **bronchodilatation** ◇ **bronkezfrankaat** Muiaat kavnez ar bronkez.
- bronchogène, bronchogénique** ◇ **bronchogenic** ◇ **bronkezien** aa. A orin bronkezel, sk. : *kist bronkezien*.
- bronchogramme** ◇ **bronchogram** ◇ **bronkezlunad g.** Skeudenn skinluniñ ar bronkez.
- bronchogramme aérien : signe du ~** ◇ **air bronchogram sign** ◇ **arouez b. ar bronkezaerlunad** Skeudenn skinluniñ ur vronkezenn e rezh ur roudenn sklaer a-dreuz d'un demerenn, o testiñ emañ an demerenn e-barzh parenkim ar skevent.
- bronchographie** ◇ **bronchography** ◇ **bronkezluniñ** Skinluniñ renet goude ensinklañ e skoultrég ar bronkez un danvezenn lugus d'ar skinoù X (iodaozad en arvez dourel).
- bronchographie sélective** ◇ **selective bronchography** ◇ **bronkezluniñ diuzel** Kalvezder skinluniñ anezhañ demeraat ur parzh hepken eus tiriad ar bronkez diwar-bouez ur sont enbronkezel.
- broncholithe** ◇ **broncholithe** ◇ **bronkezvaen g. -vein** Korf razek (*grouanenn*) dizalc'h en oaled ur vronkezenn pe amskit er speur anezhi, o tisoc'h peurliesañ eus ur werblenn nes-bronkez razeakaet, bet angreizhet ganti speur ar vronkezenn ha dehentet e-barzh an oaled anezhi.
- broncholitiase, broncholithie, lithiase bronchique** ◇ **broncholithiasis** ◇ **grouanegezh b. vronkez** Furmidigezh grouan e-barzh ar bronkez (*bronkezvein*).
- bronchomycose** ◇ **bronchomycosis** ◇ **mikoz g. bronkez, bronkezvikoz g.** Tanienn vronkez devoudet gant ar foue.
- bronchopathie** ◇ **bronchopathy** ◇ **bronkeznad g., bronkezanaez g.** Anvad genadel klañvadurioù ar bronkez.
- bronchophonie, voix bronchique, voix tubaire** ◇ **bronchophony, bronchiloquy, bronchial murmur** ◇ **mouezh b. vronkezel, mouezh korzennek, bronkezvoud g.** Arouez selaouennañ, anezhi tregren ar vouezh e diabarzh ar bruched.
- bronchoplégie** ◇ **bronchoplegia** ◇ **seizi g. ar bronkez, bronkezseizi g.** Steuz argrezusted kaherioù ar bronkez o tevoudañ an iskavnez anezho.
- bronchopneumonie** ◇ **bronchopneumonia, bronchopneumonitis** ◇ **bronkezskeventfo g.** Pore o tizhout war un dro parenkim ar skevent (logigfo linek) hag ar c'horrvronkez; dont a ra evel rouestlad d'un anaez analadel pe d'ur c'hleved hollek.
- bronchopneumopathie** ◇ **bronchopneumopathia** ◇ **bronkezskeventad g.** Anvad genadel ar c'hlañvadurioù o tizhout war un dro ar bronkez ha parenkim ar skevent.
- bronchopneumopathie chronique obstructive** ◇ **obstructive bronchopneumopathy** ◇ **bronkezskeventad henek stevius** Anvad genadel kleñvedoù ar bronkez hag ar skevent nauuus dre skorted ar gwentadur, dezho da azon pennañ ar bec'h oc'h enanalañ hag aliesoc'h oc'h ec'h ananalañ; seurtadoù anezho : ar bronkezfou henek, an astma, an emfizem.
- bronchopneumopathie de type viral, pneumonie atypique (Reimann, 1938), pneumopathie virale, pneumopathie à virus, virose pulmonaire** ◇ **atypical pneumonia, acute interstitial pneumonia, acute interstitial pneumonitis, acute influenza pneumonia, atypical bronchopneumonia, virus pneumonia, primary atypical pneumonia** ◇ **bronkezskeventfo viruzel, skeventfo g. viruzel, skeventfo arnizhek** Anvad genadel poreoù darreuziadek diwar hadennoù diseurt (viruz ar grip, ar ruzell, ar vrec'h nij, ar senkl, ar jotorell, an avufo, korfigoù a r genadoù *Chlamydia*, *Microplasma*, *Rickettsia*, h.a.) o tizhout ar skevent hag ar bronkez; deraouiñ a reont dre un azoniad poreel grevus gant asikted don ha pareañ dindan div pe deir sizhunvezh; azonet ouzh ar selaouennañ dre ronkoù bronkezel pe goustraklus, ouzh ar skinluniñ dre deñvalennoù o c'hronnañ begel ar skevent; en tu all d'an hadennoù hennadet e chom dianvar arbenn an hanter eus hevelep poreoù — en degouezh e kaver dikoc'h komz a *skeventad arnizhek kentael* (Gl. *pneumopathie atypique primitive*).
- bronchopulmonaire** ◇ **bronchopulmonary** ◇ **bronkez-skeventel** A-zivout ar bronkez hag ar skevent.
- bronchorragie** ◇ **bronchorrhagia** ◇ **bronkezwadliñv g.** Gwadliñv ar bronkez.
- bronchorrhée** ◇ **bronchorrhoea** ◇ **bronkezver g.** Glaourusvorc'h ar bronkez.
- bronchoscopie** ◇ **bronchoscopy** ◇ **bronkezewgliñ, bronkezwereañ** Imbourc'h kavenn ar bronkez dre luc'hwereañ diwarbouez ur fibroskop; kalvezder kevaraez da eztennañ korfoù estren eus ar forzhioù analañ, da wehenniñ ha prederiañ linadurioù bronkez ha skevent.
- bronchospasme** ◇ **bronchospasm** ◇ **bronkezendag g.** Argrezad dasstrizhek kaherioù ar bronkez.
- bronchospirographie** ◇ **bronchospirography** ◇ **bronkezanalwezañ** Lerc'hwezañ kevregat disoc'hoù ar bronkezanalventañ.

bronchospirométrie ◇ **bronchospirometry** ◇ **bronkezanalventañ** Imbourc'h arc'hwelel an div skeventenn : an aer o tont eus pep hini anezho ha dastumet a-ziforc'h diwar-bouez ur c'hateter divforzh a vez kaset da bep a analventer; ent vonan, ez ensamm ar skeventenn dehou 55 % hag ar skeventenn gleiz 45 % eus ar gwenterezh hollel.

bronchosténose ◇ **bronchostenosis** ◇ **bronkezisvoll** g. Strishaenn en ur poent eus skoultreg ar bronkez, o tevoudañ un trec'hwezh hag ur stridor.

bronchotomie ◇ **bronchotomy** ◇ **bronkezenbenañ** Digeriñ surjanel ur vronkezenn war-benn eztennañ ur c'horf estren pe dazbidañ ur yoc'henn enbronkeznel.

bronz-

- *cirrhose bronzée* kirroz staenek.

brosse

- *bordure en brosse* rizenn vroustek.

brouïll-

- *chambre de brouillard* kambr lusenn.

brownien : **mouvement** ~ ◇ **brownian movement** ◇ **lavig** g. **brownek**, **gwrezlavig** g. Morloc'h dizurzh ha diastal gant an eufl en arc'hoal e-barzh un heverenn, dec'hanet gant gwrezkefrou ar molekul o c'houlankañ ent neparek gremm fiñvek ouzh ar rannigou.

Brown-Séguard : **syndrome de** ~, **hémiparaplégie spinale** ◇ **BrownSéguard's disease** ◇ **azoniad Brown-Séguard**, **ledtreuzseizi** g. **livennel** Azoniad diwar un anaf en un hanterenn eus ar mel, naouus dre ul ledtreuzseizi hag ul ledaneraez don e tu an anaf hag ul ledaneraez stokadel, laurel ha gwrezel en tu all; e bevenn uhelañ an tachad seizet e vez, e tu an anaf hag a live gantañ, ur riblenn aneraez stokadel dindan ur riblenn uc'heraez.

brucellose, **mélitococcie**, **fièvre ondulante**, **fièvre de Malte**, **fièvre méditerranéenne**, **maladie de Bang** ◇ **brucellosis**, **febris melitensis**, **melitococcus infection**, **melitococcosis**, **undulant fever**, **Malta fever**, **Mediterranean fever**, **Cyprus fever**, **goat fever**, **Gibraltar fever**, **Neapolitan fever**, **Rock fever**, **Rio grande fever**, **dust fever**, **slow fever**, **febris sudoralis**, **morbus Bang** ◇ **brukelloz** g., **melitokokoz** g., **terzhienn wagennus**, **terzhienn Valta**, **terzhienn vorkreizat**, **terzhienn ar givri**, **terzhienn c'hwezennus**, **kleñved Bang** Pore diwar vakteri eus ar genad *Brucella* o tizhout ar chatal (givri, deñved, bioù, moc'h), treuzkaset d'an dud dre ar stekiñ pe dre euvriñ laezh, naouus dre un derzhienn spanaus, direoliek ha gwagennek, c'hwezennou puilh, lauriou diseurt hag asikted vras, o tedriñ dre remortadoù war lies miz hag o vont da lec'hiadurioù flugezel goulemm ha liesstumm (eskern-arzoù, empenn-pilhon, avu); deznaouet e vez ar brukelloz dre wadveizprouad Wright, prederiet dre ar bevastalerioù, erguret dre ar vaksinañ.

Brudzinski : **signes de** ~ ◇ **Brudzinski's signs** ◇ **arouezioù** l. (b.) **Brudzinski** Kefleuñvadoù evit lakaat war wel ar reuted a-bilhon, azon ur pilhonfo alivenn, dre araez an astenn gouzañvat eus ar c'higennoù lez-livenn : 1) *damoug a-eiltu* (Gl. *réflexe controlatéral*) : plegañ a-nerzh ar c'har hag ar vorzhed en un tu a zevoud ur fiñval en ezel all, pe plegañ (*damoug kenlank*, Gl. *réflexe identique*), pe astenn (*damoug ginlank*, Gl. *réflexe réciproque*); 2) *arouez an askil* (Gl. *signe de la nuque*) : plegañ gouzañvat an askil warraok a zevoud ar plegañ en izili traoñ.

brugiose ◇ **Malayan filariosis** ◇ **brugioz** g., **filariaz** g. **malaiat** Seurtad filariaz limfel diwar *Brugia malayi*, o reuziañ en India hag e Gevredazia, anezhañ gouliñvodoù lec'hiet dindan an daoulin.

bruit blanc ◇ **white sound** ◇ **trouz gwenn** Trouz o tisoc'h a ec'hodiñ en ur ser, a un kreñvder, holl dalmoù skalfad ar stenioù, arveret er c'hlevandalañ evit disklevedriñ an eil skouarn war-benn savelañ gwehin eben (sl. *assourdissement*).

bruit d'éjection ◇ **click of ejection** ◇ **stlak** g. **an diflistr** Trouz ar galon merzhnet evel ur stlak talmerel derou-sistol, kempred gant deroù diflistr ar c'hofig, naouus d'un isvoll trapig.

bruit de canon ◇ **bruit de canon**, **annon sound** ◇ **trouz kanol** Tregern spanaus eus trouz kentañ ar galon pa vez tolc'had kentez-kofig klok, diwar verniad ar pevare hag ar c'hentañ trouz.

bruit de fond ◇ **background**, **static** ◇ **vorm** g. Teskad an ardrouzoù, pe arhentou euverek, o tegouezhout e hoskad dibenn ur ristenn vuzuliañ, o taremouzh gant an arhentou arverek hag o tiaesaat an dinoñ anezho.

bruit de galop ◇ **gallop rhythm** ◇ **korvez** b. **c'haloup**, **trilamm** g. Korvez trizaol diwar an ouzhpennadur, e-kerz an diastol, da zaou drouz reol ar galon eus un trede trouz devoudet gant falladur ar c'hofig; hervez ar pred m'en klever e teskriver : an *trilamm raksistol* pe *kentezel* (Gl. *galop pré-systolique* pe *atrial*), an *trilamm derou-diaistol* pe *kofigel* (Gl. *galop protodiastolique* pe *ventriculaire*), an *trilamm mezdiastol* pe *a-vernial* (Gl. *galop mésodiastolique* pe *de sommation*), an *trilamm goudesistol* (Gl. *galop postsystolique*).

bruit de sommation ◇ **summation sound** ◇ **trouz a-vernial** Trouz ar galon, hanter-diaistol peurliesañ, enlezkernel pe gernel, o tisoc'h eus aruniad an trede hag ar pevare trouz, hag int anklevet ent vonan, merzhnet a-wechoù pa vez kalonustead pe tolc'had kentez-kofig.

bruit de triquet, **clac systolique** ◇ **systolic click** ◇ **stlak sistol** Trouz sec'h, parchek, trebad, klevet etre eil ha trede trouz ar galon (*stlak dibenn-sistol* pe *mezdiastol*, Gl. *clac télé- ou mésosystolique*); naouus d'ar skortedoù mintrek leiek dre volzennad an trapig mintrek.

bruit glottique, souffle laryngotrachéal ◇ **glottic noise** ◇ **trouez tarzhel, sourr g. garloc'henn-briant** Trouez diwar dremen an aer dre faout an tarzh, merzhed ent reol e-kefin ar vrian hag ar pennvronkez; ent kleñvedel e c'hell treledañ betek parenkim ar skevent.

bruits du cœur ◇ **heart sounds** ◇ **trouzoù ar galon** Teskad an anadennoù stanel dec'haret gant trovezh ar galon : 1) *trouez kentañ* (*T*₁) (Gl. *premier bruit*, *B*₁, Sz. *first heart sound*, *S*₁), e pennderoù an drovezh kalon, diwar serridigezh an trapigoù kentez-kofig; 2) *tav bihan* (Gl. *petit silence*), diouzhtu goude, e-doug sistol ar c'hofigoù; 3) *eil trouez* (*T*₂) (Gl. *deuxième bruit*, *B*₂, Sz. *second heart sound*, *S*₂), diwar serridigezh ar sac'helloù kornloarek aortek hag a-skevent; 4) *tav bras* (Gl. *grand silence*), didrouz er selaouennañ etre an eil trouez ha deroù an drovezh da heul, kempred gant diastol ar c'hofigoù; Daou drouz all a seller evel bonan evito da vezañ degouezhek : 5) *trede trouez* (*T*₃) (Gl. *troisième bruit*, *B*₃, Sz. *third heart sound*, *S*₃), trouez deroù-diastol a stader alies gant an den yaouank en e c'hourvez, kevaraezet gant ar c'halonustead, diwar daskren ar c'hofig kleiz e-kerz e leugnidigezh; 6) *pevare trouez* (*T*₄) (Gl. *quatrième bruit*, *B*₄, Sz. *fourth heart sound*, *S*₄), daskren izeldalm a-raok an trouez kentañ, dinoet dre ar c'halonstenwezer, test eus sistol ar c'hentez.

bruit

• *bruit clangoreux, clangor* stirilh • *bruits normaux ou pathologiques* trouzoù bonan pe gleñvedel.

brûlure ◇ **burn** ◇ **devad g.** Anaf diwar wered ar wrez; tri derez a ziforc'her : 1) *devad kentañ derez* : eritem laurus; 2) *devad eil derez* : tachadoù bras pe vrasoc'h a glogorennoù hevon pe a dosennoù filhoc'hennek war ur goueled ruz ha gouliñvek; kemm a lakaer etre an *devad eil derez don* ha *bas* hervez ma 'z eo pe ma 'no ket tizhet gwiskad Malpighi; 3) *devad trede derez* : pulluc'hadur an amwiskadoù hag ar gwiadoù danlec'hiet.

brûl-

• *douleur de forte intensité, à caractère de brûlure cuisante* laur kreñv, poazhus • *instrument utilisé pour brûler un tissu* ardivink arveret da zeviñ ur wiadenn • *syndrome paresthésique à type de brûlures des extrémités* azoniad kammeraezel e rezh loskadurezh en eizhaennoù.

brut-

• *dissolution brutale du tonus de posture* steuziadur trumm an tant emstumm • *la brutalité d'un épisode psychopathologique* feulster ur resmiad bredkleñved • *laxatif d'action brutale* laoskuzenn rust.

Bruton : **maladie de ~** ◇ **Bruton type hypogammaglobulinaemia** ◇ **kleñved Bruton** Kleñved hêrezhel enkilek reveeret o tizhout ar baotred hepken, naous adalek ar mabanvezh dre boreadoù grevus hag adfeillus ar forzhioù analañ ha koazhañ hag ar c'hroc'henn, e dianlen gwadivesc'h an immunoglobulinoù gwadveizel hag anvorc'h an antikorfoù, ezvezañs al limfokit B (plasmokit) dougerioù an immunoglobulinoù a-gennenn (endra vez reol niver bloc'hel al limfokit hag an hangae kellighanterat) (sl. *agammaglobulinémie*).

bruxisme, brycomanie ◇ **brychomania** ◇ **dentrakañ, dentrak g.** Skrignañ an dent dre ar c'houk, diwar ur c'heharzvell siek pe ar spasmodifliezh.

bubon ◇ **bubo** ◇ **1 gwerbl b. 2 c'hwarrenn b. 3 gwerblennfo g. spesadel, gwerbl** [Gr. *βουβών* a dalveze kement ha a) barlenn, b) yoc'henn er varlenn, c) yoc'henn, porbolenn, burbuenn] 1 Gl. *bubon*, Sz. *bubo*, krBr. *guerbl*, gwerblennfo ar varlenn (ster dispredet). 2 Nep koeñvenn eus ar gwerblennoù (eil ster, dispredet ivez). 3 Tizhad ar gwerblennoù gant ar vosenn, al livant meizh, ar sifiliz, h.a. (ster kempred).

bubonique

• *peste bubonique* bosenn werblek.

bubonocèle, hernie inguino-pubienne ◇ **bubonocèle** ◇ **aveleñ b. varlennkaezour, ogad g. barlennkaezour** Avelenn o tehenñ dre ganol ar varlenn hag oc'h argouc'hañ dre walenn vas ar varlenn.

buccal

• *administrer par voie buccale, administrer par voie orale* diounit dre ar genoù, diounit genaouel, diounit dre euvriñ • *appareil buccal* benvegad genoù • *crochets buccaux* bac'higoù genaouel • *digestion buccale* koazhañ genaouel.

Budd-Chiari : **syndrome de ~** ◇ **Budd-Chiari syndrome** ◇ **azoniad Budd-Chiari** Anaev dibaot o c'hoarvezout ent neuz-iadurel eus steviad gwazhiennnoù an avu (hag alies ar wazhienn gav izelañ) diwar un tromboz (kleñved Vaquez) pe ur yoc'henn yud en avu pe el lounezh, ent klinikel eus poanioù kof, usvent an avu hag ar felc'h, uc'hamred gwazhiennel endan-groc'henn, gouliñoù (torliñv) hag a-wechoù iktar.

Budin : **manœuvre de ~** ◇ **kefleuñvad g. Budin** Kefleuñvad evit muiaat plegadur ar grouell er grozh, anezhañ pouezañ war deun ar mammog en ur deuta gant bizied an dorn all war glask da gostez kaletañ ar grozh, m'emañ kein ar grouell.

Budin : **signe de Budin** ◇ **arouez b. Budin** Bezañs lin e rezh ur rodenn velen en dro d'al laezh dastumet war un telt, oc'h azonañ ar bronnnfo.

buffalo neck, bosse de bison ◇ **buffalo neck (SzAm.)** ◇ **choug g. bizon** Tortenn ar choug, azon eus ar c'haenusvorc'h (sl. *Cushing* : *maladie de ~*).

bulbaire : **syndrome ~** ◇ **bulbar syndrome** ◇ **azoniad an hirvel** Hollad an arouezioù diwar dizhadur al luniadoù diseurt a ya d'ober an hirvel, anezho direizhoù loc'hadel ha santadel, a-eiltu peurliesañ, ha peluzoù agendu an nervennoù a-glopenn.

- bulbaire** : syndrome ~ antérieur médian, syndrome interolivaire de Dejerine, syndrome paramédian de Foix ◇ Dejerine's anterior bulbar syndrome ◇ azoniad araok kreizer an hirvel Seizi dastuat diwar dizhadur parzh diaraok an hirvel (stirad pikernennek, lietenn greizel, gronn an nervenn c'houdeodel), erzerc'h dre ul ledseizi a-eiltu hebiat d'ar fas ha ledseizi an teod gant kaheristeñv.
- bulbaire** : syndrome ~s latéraux ◇ ◇ azoniadoù kostezel an hirvel Azoniadoù diwar voukadur kostezel an hirvel a orin talmerel, anezho ul ledseizi dastuat, ul ledazoniad ilpennel a-gendu ha direizhoù loc'hadel ha santadel a-eiltu en izili.
- bulbaire** : syndrome ~s postérieurs ou dorsaux ◇ ◇ azoniadoù adreñv an hirvel Azoniadoù diwar dizhadur lodenn adreñv an hirvel, anezho seizi an nervennoù a-hirvel (X¹, XI¹ ha XII¹ nervenn a-glopenn) e tu an anaf.
- bulbe artériel** ◇ **bulbus arteriosus** ◇ **ognonenn b. dalmerel** Parzh eus kanol arc'hkalon ar rizhell en astenn d'ar c'hofig kezvik ha kendalc'het gant ar c'hef talmerel o tisoc'h eus kendeuz an aortennoù kofel; diouti e tiwano an darn bennañ eus ar c'hofig dehou.
- bulbe carotidien** ◇ **carotid sinus** ◇ **god g. ar garotidenn** Frankaenn e deroù ar garotidenn diabarzh pe e forc'h ar garotidenn voutin, ar blezhad karotidenn o skoultrennañ en dro dezhi.
- bulbe duodénal** ◇ **duodenal cap** ◇ **kabell g. an daouzegenn** Rann dehou frankaet eus an daouzegenn gentañ, sez voas an angreizhoù.
- bulbe olfactif** ◇ **olfactory bulb** ◇ **ognonenn ar c'hwesa** Penn araok bazhoulheñvel nervenn ar c'hwesa o tisoc'h eus rizennoù houmañ o vodellañ goude treuziñ lavnenn groueriek ar sileg.
- bulbe rachidien** ◇ **spinal bulb** ◇ **hirvel g.** Lodenn izelañ eus kef an empenn, loet etre ar mel gouzoug hag ar pont, ouzh he ober, en arao, ar pikernennoù, an olivennoù ha flosk an nervenn c'houdeodel, en adreñv, troadoù izelañ an ilpenn; drezañ e tremen ar gwiennoù hir (stirad pikernennek, hordennoù moan ha gennheñvel, stirad gronnruz-livenn, stirad livenn-derc'hvel); ennañ emañ ar gronnoù halviñ, gronn a-gein an nervenn dispis hag ar stummadur rouedek.
- bulbes pileux** ◇ **dermal papillae** ◇ **ognon s. -enn, blevognon s. -enn** Parzh donañ bolc'h ar blev, sanket en donenn, o c'hoarvezout eus ar mammgelligoù o tanzen ar blev.
- bulle** ◇ **bulla** ◇ **gloevenn b.** C'hwezigen vras, anaf elfennel eus an ezkroc'hen, balirenn hevonn, dezhi un nebeut milimetroù treuzkiz, leun gant ul liñvenn levrus pe wadek (sl. *ampoule, phlyctène, vésicule*).
- bulle pulmonaire** ◇ **pulmonary bulla** ◇ **gloevenn skevent** Hogennad aezhel e-barzh ar skevent, ouzhpenn 1 cm treuzkiz, ar parenkim kefin o vezañ bonan pe gleñvedel; tanav e vez speur ar c'hloevenn, hep epiteliadur, e kemm ouzh ar c'histoù hag ar c'havennoù (sl. *caverne, pneumatocèle*).
- bulleux** : râle ~, râle humide ◇ **bubbling rale, bullous rale, moist rale** ◇ **ronk bouilhek, ronk mouest** Seurtad ronkoù goustraklus, glaourek, a-gevenep d'ar ronkoù sec'h.
- Bumke** : **pupille de ~, signe de ~** ◇ **Bumke's pupil, Bumke's anxiety pupil, Bumke's symptome** ◇ **arouez b. Bumke** Mabusvoll berrbad a orin bredel, a-geñver gant an enkreuz pe gant stadoù kleñvedel (psikozioù, darfell).
- buphtalmie, hydrophthalmie** ◇ **buphthalmia** ◇ **bulagad g., lagadfoeñv g.** Kresk kleñvedel ec'honad al lagad da heul muiadur ar gwask enlagadel, stadet peurliesañ a-geñver gant ar glaokom ganedigel.
- Burdach** : **faisceau de ~, faisceau cunéiforme** ◇ **fasciculus cuneatus** ◇ **hordenn b. c'hennheñvel** Hordenn a-sevel gwiennoù mielinek o vont eus korn adreñv ar mel d'ar gronn gennheñvel dre zehentiñ e lodenn diavaez ar pañs adreñv a-eiltu; forzh ar stokeraezhiñ skaradel evit an tiriad penn-brec'h.
- Burdach** : **noyau de ~, noyau cunéiforme** ◇ **cuneate nucleus** ◇ **gronn g. gennheñvel** Gronn loet en hirvel, azhenter etre an hordenn c'hennheñvel hag ar gwiennoù mielinek o tibennañ en derc'hvel a-eiltu.
- Burkitt** : **lymphome de ~, tumeur de ~** ◇ **Burkitt's lymphoma** ◇ **limfom Burkitt** Kleñved broreuziat en Afrika drovanel o tizhout ar vugale poreet gant ar virus EB (kerentiad an *Herpesviridae*), yoc'henn werblennel yud loet er fas (garvan, poull lagad), a brederier hag alies a bareer dre ar c'himigurañ.
- Burnet** : **intradermoréaction de ~** ◇ **Burnet's intradermo-reaction** ◇ **prouad g. entonenn Burnet, erwezh g. entonenn Burnet** Prouad embreget dre ensinklañ en donenn ur silad eus tiñvadur *Brucella melitensis*; c'hoarvezout a ra an erwezh gant kleñvion ar brukelloz, ha yaek e tarvez chom etre daou ha pemp bloaz goude ar pare (sl. *brucellose*).
- Burnett** : **syndrome de ~, syndrome des buveurs de lait, syndrome du lait et des alcalins** ◇ **milk-alkali syndrome** ◇ **azoniad Burnett, azoniad al laezh hag an alkaliegou** Skorted lounezh henek diwar un nefrokalkinoz ha/pe grouanegezh razek al lounezh gant alkaloz ha gwadusvec'h kalkiom, e dianlen euvriñ reñverek ha hirbad laezh ha/pe halioù alkaliek ha razek, peurgetket da geñver mezegeañ un angreizh kreuz-daouzegenn; deskrivet e vez ur furn henek gant koc'hionadoù halioù kalkiom er gwiadoù (flugez, eskern, endan-groc'hen), ur furn lemm gant c'hweladurioù, eldroazh, asikted, morgud, दौरisvec'h.
- burning feet, syndrome des pieds brûlants, syndrome de Gopalan** ◇ **Gopalan's syndrome, burning feet** ◇ **azoniad Gopalan, treid losk** Azoniad kammeraezel a voe deskrivet da gentañ en India, anezhañ laurioù e rezh kemenerion, berioù ha dreist holl loskadurezh en eizhaennoù, war un dro gant an usdamoug, ar glazoù ha strafuilhoù ar gweled, sellet evel erzerc'had eus an negezh vitaminou B ha proteinou.
- bursite** ◇ **bursitis** ◇ **yalc'hfo g.** Tanijenn lemm pe henek eus ur yalc'h levrus.

- bursographie** ◇ **bursography** ◇ **yalc'hluniñ** Skinluniñ ur yalc'h levrus goude ensinklañ enni un danvezenn demer ouzh ar skinoù X.
- bursopathie** ◇ **bursopathy** ◇ **yalc'hanaez** g. Nep klañvadur eus ur yalc'h levrus.
- Burstein** : **épreuve de ~**, **réaction de ~**, **test de ~** ◇ **Burstein's method** ◇ **hentenn Burstein** Elfennañ demerventadel β-lipoproteinou ar gwadveiz gouledeket diwar-bouez sulfat dekstran (hentenn dispredet).
- Burton** ; **liseré de ~**, **liseré saturnin**, **liseré plombique** ◇ **Burton's line** ◇ **glizenn b. Burton**, **glizenn blomet** Linenn arzu war ribl ar munsunou ouzh gouzoug an dent e dianlen ar pistriadur henek dre ar plom, kevret alies gant plakennoù livegennek war c'hlaourgenn an divc'hen.
- butée** ◇ **joint stop** ◇ **skurzell b.** Trevnad parzh en un osod (erstedell pe amstedell) arloet ouzh ur c'henvell war-benn krennañ al loc'hañ anezhañ.
- butée osseuse** ◇ **bolt** ◇ **skurzell askorn** Imboudenn askorn festet dre viñsoù a lakaer da valirañ e-kefin ur c'henvell evit leiaat heled e loc'hoù war-benn e stabilaat ha mirout ouzh an disvelladoù.
- butyrophénones** ◇ **butyrophenones** ◇ **butirofenoneier** l. (u. : **butirofenon**) Stroll kediadoù neuroleptek deveret diouzh ar butirofenon, arveret da brederiañ ar psikozioù dre berzh o gwered eneptrezerc'hek ; an hini koshañ anezho eo an *haloperidol* (1957).
- buvardage** ◇ **blot** ◇ **spluiñ**, **blot** g. Kalvezder imboure'hva arveret evit ren hangaedrezkas an trenkennoù nukleek (digelet dre ur sont skinoberiek : *southern-blot* evit an DNA, *northern-blot* evit an RNA, h.a.) (sl. *dot blot*, *immunotransfert*).
- byssinose**, **byssinosis** ◇ **byssinosis** ◇ **bisinoz** g. Skeventad hangaeel o tizhout ar vicherourion o tewentañ uzor ar c'hotoñs (dormerion, c'hoalerion, divouellerion).
- Bywaters** : **syndrome de ~**, **syndrome d'écrasement** ◇ **Bywaters' syndrome**, **crush syndrome**, **crush injury**, **compression syndrome** ◇ **azoniad Bywaters**, **azoniad ar gwask**, **azoniad ar flastr**, **flastranaf** g. Teskad ar strafuilhoù o c'hoarvezout en eurvezhoù goude gwaskadur kreñv ha hirbad un pe lies ezel pe ul lodenn eus ar c'horf, diwar marvennad ledek ar c'haherioù, o tevoudañ skorted lemm al lounezhi, marvus alies.

C

C.A.O. (dents permanentes cariées, absentes, obturées) ◇ ◇ B.D.B. (dent pad bruket, diank, barret).

c.a.o. (dents de lait cariées, absentes, obturées) ◇ ◇ b.d.b. (dent laezh bruket, diank, barret).

ça ◇ id ◇ se Unan eus an tri ensav savelet gant Freud en e eil arlakadenn eus ar benvegad bred, blein diemouez al luzadoù.

cabinet de groupe ◇ group practice ◇ kuzulva g. stroll Kuzulva ma vez o pleustrñ lies embregour kevredet (tri da nebeutañ), hollegourion pe arbennigourion, en o c'herz an un aveadurioù hag an un gwazadurioù.

cabinet d'équipe ◇ multispeciality group practice ◇ kuzulva liesarbennigiezh Stavell vezegel ma pleustr lies arbennigour a ziskiblezhioù kevarall.

Cabot : corps annulaires de ~ ◇ Cabot's ring bodies ◇ ruilhennoù Cabot Lunioù e stumm kelc'hienn, sifrenn 8, alc'houez sol, a weler e-barzh an eritrokit da geñver furmoù 'zo a amwad loezadel.

Cabrera : signes de ~ ◇ Cabrera's signs ◇ arouezioù Cabrera Arouezioù kalonvarrwezadel eus angwazhiad ar c'haher kalon o sezañ e diaraog an dilhenn, kevret gant un tolc'had barr kleiz : /) bezañs ur c'hrog 0,05 s pad da nebeutañ war vann-sevel ar wagenn S e V₃ ha V₄, 2) bezañs ur wagenn r e V₁.

cachectine ◇ cachectin, tumor necrotizing factor α , TNF α ◇ kachektin g., parenn b. yoc'hennel marvennus α , TNF α Protein 17 000 d (kitokin) borc'het gant ar makrofag, o skoilhañ ouzh hogennadur al lipid, alese e wered treuteiat; an un molekul eo ha parenn varvennus ar c'helligoù kankrel.

cachet ◇ cachet ◇ kached g. Furm diounit ar gwezherioù o c'hoarvezout eus div gibig bara dic'hoell peget dre o genoù ha lakaet etrezo un danvezenn hueek; ouzh ar c'hachedoù eo bet erlec'hiet ar bolc'hanoù (sl. *capsule, comprimé, gélule*).

cachexie ◇ cachexia ◇ fallezh b. Distresadur ar stad hollek gant treuted eizhañ naous da brantad diwezhañ kleñvedoù henek 'zo.

cachexie diencéphalique de Russell, syndrome de Russell ◇ Russell's syndrome ◇ fallezh treuzempennel Russell, azon-iad Russell Kleñved dibaot o tarvezout e-kerz daou vloavezh kentañ an hoali diwar ur yoc'henn e parzh diaraok ar gouzerc'hvel, lies azon dezhañ : treutaat argammedek diwar steuz ar behin, kreskiñ buanaet, hevred, uc'hilboued ha fiñverezh reñverek.

cachexie thyroïdienne ◇ thyroid cachexia ◇ fallezh skoedennel Fallezh o tarvezout e lankad olañ pe e furmoù lemm kleñved Basedow pe c'hoazh e prantad diwezhañ ar miksedem.

cacographie ◇ ◇ darallskriv g. Strafulh ar skrivañ, anezhañ disneuziañ ar gerioù hag ar c'hevreadur, azon an anluz pe an envedi.

cacogueusie ◇ cacogueusia ◇ louvdañva Darallad an tañva, blaz fall merzhet en ur zebriñ pe e-maez an debriñ.

cacolalie, cacophonie, jargonaphasie, jargonophonie, paraphrasie littéraire ◇ jargonaphasia ◇ darallgomz g., jagou-ilherezh g., kammezluz g. neuziadel Strafulh ar prezeg, anezhañ disneuziañ unvezioù steuñvenn ar gomz.

cacosmie, cacosmie subjective ◇ cacosmia, kakosmia ◇ 1 louvc'hwsha 2 louvc'hwsha kammzerc'hat 3 louvc'hwsha trezerc'hat, louvc'hwsha errizhat 4 louvre b. 1 Dec'havaelañ ankevas c'hwezhoù fall. 2 Louvc'hwsha diwar un tizhad kreudel (analadel, koazhadel, nerval). 3 Louvc'hwsha ambreel. 4 Tech da emvlisa gant c'hwezhoù fall (sl. *dysosmie, ozène, parosmie, pseudosmie*).

cacosmie objective ◇ ◇ louvanal g. C'hwez fall taolet gant forzhioù analañ pe gant forzhioù koazhañ uhelañ, merzhet war un dro gant ar gouziviad ha gant an dud nes.

cacostomie ◇ cacostomia ◇ louvc'henoù g. C'hwez fall laosket gant ar genoù, hag o tont e ve eus bruk an dent, an huegfo, ar bronkezfo, h.a.

CADASIL ◇ cerebral autosomal dominant arteriopathy with subcortical infarcts and leucoencephalopathy, CADASIL ◇ CADASIL g. Anaez familhel a'n oadourion yaouank a-geñver gant ur c'henenn eus ar c'hromozom 19, naous dre zarvoudoù heskwad endan-bluskenn o tedreñ d'ur seizi gaouhirvelel pe d'an envedi; er mod aotozomek trec'hek e vez treuzkaset ar c'hleñved.

cadavérique : phénomènes ~s ◇ **post mortem changes** ◇ **anadennoù** l. (b.) **kelanel, kemmadoù** l. (g.) **goude (ar) marv** Anadennoù fizikel, kimiek ha garvel o c'hoarvezout goude ar marv hag o tisoc'h gant distruj ar c'helan.

cadavérique : rigidité ~ ◇ **rigor mortis, cadaveric rigidity** ◇ **reuter g. ar marv, reuter kelan** Anadenn o c'hoarvezout etre ur c'hard eurvezh ha seizh eurvezh goude ar marv diwar zispenn an drenkenn adenosin trifosforek, o trovadañ lanvidikaat ha stennidikaat ar c'haerwianoù.

cadavre : faune des ~s ◇ **cadaveric fauna** ◇ **mileg b. ar c'helanoù** Steudad ar spesadoù amprevaned o tont lerc'h ouzh lerc'h bep ma vez ec'haoz an danveziou bevel o tiraaz ar bazenn a-geñver gant o ezhommoù mezbur.

caducée ◇ **caduceus** ◇ **bazh b. naerek, naerwialenn b.** En Henved, gwerezerc'h Hermes pe Merc'her, gwialenn lore pe olivez gant div askellig ouzh he fenn krec'h hag, en dro dezhi, an div naer kenweet en doa Hermes o disrannet hervez ar gwengel tra m'edont o stourm an eil ouzh eben; evel argel ar peoc'h, e voe degemeret evel eolon ar gannadourion hag al leunc'halloudeion; da c'houde e teuas da vezañ gwerezerc'h Asklepios, doue ar Vezekniezh, en ur gemer stumm un hordenn wial gant un naer hepken outi hag, e krec'h, ur melezzour ront, argel an ersell; hiziv, ardamez ar vezeion ha gwezhourion ar yec'hed.

caduque, membrane caduque, caduque utérine, déciduale ◇ **decidua** ◇ **kollgenn g.** Lodenn eus glaourgenn ar grozh a vez dilaosket a-ser gant an dorzhienn goude ar gwilioud.

caduque basale, sérotine, caduque utéro-placentaire ◇ **basal decidua** ◇ **kollgenn a-ziaz** Rann eus ar c'hollgenn e diastok speur ar grozh diouzh un tu, haen diaz an dorzhienn diouzh an tu all, kevastenn enta da leur enkrañ an dorzhienn.

caduque menstruelle ◇ **decidua menstrualis** ◇ **kollgenn ar mizioù, kollgenn miziaouel** Lodenn eus glaourgenn ar grozh o tisglenañ da geñver ar mizioù.

caduque pariétale, caduque vraie, caduque utérine ◇ **parietal decidua, decidua vera** ◇ **kollgenn a-speur, kollgenn gwir, kollgenn a-grozh** Rann eus ar c'hollgenn o c'holeiñ kavenn ar grozh a-dal d'ar rizehell hag o vont kempeg gant ar c'hollgenn asplegek.

caduque réfléchie, caduque capsulaire, caduque fœtale, caduque ovulaire ◇ **decidua reflexa, decidua capsularis, capsular decidua, capsularis reflexa, membrana adventitia (uteri)** ◇ **kollgenn asplegek, kollgenn a-vi** Rann eus ar c'hollgenn o c'hronañ ar rizehell e tu oaled ar grozh hag o vont kempeg gant ar c'hollgenn a-speur, o kas da get kavenn ar grozh.

caduque : ponte mensuelle de la ~ ◇ **deciduation** ◇ **diskollgennañ miziaouel, disglenañ miziaouel ar c'hollgenn** Dilaoskiñ glaourgenn ar grozh da geñver ar mizioù.

cæcocolostomie ◇ **c(a)ecocolostomy** ◇ **dasforzhañ sac'henn-kolon** Amparañ surjaniel un dasforzhad tu-ouzh-tu etre ar sac'henn hag ar c'holon a-ziskenn, war-benn savelañ un amdreugad goustegus pa vez kankroù andilamadus er vouzellenn dev hag en doare-se hepkoriñ un adfrazhañ.

cæcofixation, cæcopexie, typhloplexie ◇ **c(a)ecopexy, typhloplexy** ◇ **Aanlenañ sac'henn, sac'hennAanlenañ** Stagañ surjaniel ar sac'henn ouzh speur poull ar glun dehou war-benn parraat ouzh an heloc'h re vras anezhi.

cæcostomie, typhlostomie ◇ **c(a)ecostomy, typhlostomy** ◇ **ezforzhañ sac'henn, sac'hennenezforzhañ** Seurtad eus an adfrazhañ, skarvañ trebadek pe amzeriat ar sac'henn ouzh speur ar c'hof.

cæcotomie ◇ **c(a)ecotomy** ◇ **enbenañ sac'henn, sac'hennenbenañ** Digeriñ surjaniel ar sac'henn.

cæcum ◇ **cæcum** ◇ **sac'henn b.** Rann deroù ar c'holon dehou, frankaennek ha diliver (eleze hep kandedenn ouzh he eren ouzh ar speur), merket he bevenn grec'h gant difourk ar glunegenn er c'holon; en astenn dezhi en traoñ emañ an divilhenn breñvek.

caféine, théine ◇ **caffeine** ◇ **kafein g., tein g.** 1,3,7 trimetilksantin, alkaloidenn bennañ ar c'hafe hag an te, kalon-ha nervusreer, enepkernad; *kafeegezh* (Gl. *caféisme*) a reer eus ar pistriadir henek dre ar c'hafe.

Caffey-Smyth : maladie de ~, **syndrome de Roske-De Toni-Caffey, hyperostose corticale infantile** ◇ **Caffey-Smyth's disease** ◇ **kleñved Caffey-Smyth, kaenustreuz askorn mabanel** Anaev a orin dianav o tizhout ar vagadell etre e 3^e hag e 4^e miz, naouus dre devaennoù eus kaen an eskern (trebez, kostoù, gaved, helmo), koeñvadur laurus al lienstrennoù hag ar c'higennoù kefin, arouezioù tanijenn (terzhienn, elwenn, ustizh gouzediñ); pareañ a ra ent emdarzh dindan un nebeut mizioù.

cage thoracique ◇ **cavity of thorax** ◇ **kavenn b. ar brusk** Teskad an eskern a ya d'ober atel ar brusk, anezho ar glerenn en a-raok, ar melloù brusk en a-dreñv, ar gwaregoù kostoù en daou du.

caillot ◇ **clot, coagulum** ◇ **kaouledenn b. (s. : kaouled)** Rouedad fibrin andileizh oc'h azderc'hel en he mailhoù elfennoù luniek ar gwad (sl. *coagulation, thrombus*).

caillot : rétraction du ~ ◇ **clot retraction** ◇ **kurzhañ ar gaouledenn** Pazenn diwezhañ a 'r gwadkaeañ ha stankañ ar boulec'h er gwazhied.

Cain : complexe de ~, **complexe d'intrusion** ◇ **Cain's complex** ◇ **kemplezh b. Kain, komplezh an emgoradur** Emzalc'h galen ur bugel ouzh e vreurdeur ha c'hoarezed kantaezet evel emgorerion pa rank rannañ ganto preder ha karantez e gerent.

caissons : maladie des ~, **maladie des plongeurs, paralysie des plongeurs, aérémie, aéro-embolisme, dysbarisme** ◇ **caisson disease, caisson sickness, decompression sickness** ◇ **kleñved ar c'haelogoù, kleñved ar splujerion, seizi g. ar splujerion, gwadaezhad g., aerenfroù g., anaev al lammwask** Dindan an anvadoù-se e voder ar strafuilhoù diwar zinodiñ klogor aezhenn er gwad hag er gwadoù da heul leiaat trumm an amwask, eleze pa dremener eus un amwask uhel d'an aerwask reol (donsplujerion) pe eus an aerwask reol d'un amwask izel (astraerion).

cal (osseux) ◇ **callus** ◇ **klomenn b. (askorn)** Steuñvenn stirek nevezfurmet (klomenn gentael) o tiwanañ e-barzh sezenn un torr, o vont war askornaat (klomenn eilvedel) hag o kas da benn ratreadur an torr (kevandiñvañ).

cal vicieux ◇ **malunion** ◇ **kammgovliñ, kammgovlad g.** Kevandiñvad en ul lakadur fall eus un askorn torret.

calcanéite ◇ **calcaneitis** ◇ **seulfo g.** Tanijenn an askorn seul.

calcarin : **scissure** ~e, **sillon** ~ ◇ **calcarine sulcus** ◇ **nant g. kentrevnek** Nant don war dalbenn diabarzh an hanterenn empenn, astennet a-zremm adalek ar blein kilpenn, an nant kiteren-kilpenn o tifourkañ ennañ.

calcémie ◇ **calcemia** ◇ **gwadvec'h g. kalkiom** ◇ **kalkiomwadvec'h g.** Feur kalkiom e plasma ar gwad, ent vonan 2,5 mmol/l (100 mg/l); diforc'hiñ a reer ur rann ionaet (57 %), ur rann lenet ouzh ar proteinoù (38 %) hag ur rann kediet ouzh an drenkenn gitrek (5 %).

calciférol, ergocalciférol ◇ **calciferol** ◇ **kalkiferol g., ergokalkiferol g.** Vitamin D₂ eneplec'h, oberiet dre skinata an ergosterol; perzhiañ a ra e lenadur ar c'halkiom; emañ nevez ar vitamin D₂ e devoud al lec'h; diwar an usvec'h anezhañ e c'hoarvez dare'hoal, treutaat ha reñver askornaat.

calcification ◇ **calcification** ◇ **1 razekaat 2 razekaat 3 razekaenn b.** 1 Argerzh bonan lodek e danzen ar gwiad askorn. 2 Koc'hionadur kleñvedel halioù kalkiom andileizh e-barzh gwiadoù na vezont ket razekaet ent vonan; peurliesañ e c'hoarvez hevelep intradur razek e load un anaf diagent (dic'henezhadel, foel, marvennel, h.a.). 3 Hogennad halioù kalkiom e-barzh ur gwiad, dinodet e rezh un demerenn ouzh ar skinoù X.

calcinose ◇ **calcinosis** ◇ **kalkinoz g.** Bezañs er gwiadoù meizh eus koc'hionadoù razek Xdemer; hollek e c'hell bezañ ha tizhout ar flugez, ar c'higennoù, an talmerennoù, ar c'hroc'hen, pe lec'hiek (al lounezhi, sl. *néphrocalcinose*); ent klasel e lakaer kemm etre ar c'halkinozioù hennadek hag ar c'halkinozioù eilvedel, stadet e-keñver anaezioù evel an usvec'hiegezh vitamin D, ur c'hleñved eus ar c'hollagen (skleroderma), ur mielom, azoniad Burnett (sl. *Burnett : syndrome de ~*).

calciostat ◇ **calciostat** ◇ **kalkiomreoler g.** Trevnad arouleviañ kennevid ar c'halkiom er bevedeg, e dalc'h daou hormon a-c'hourzhal, ar parathormon (kalkiomusvec'huis) hag ar c'halkitonin (kalkiomisvec'huis).

calciopexie ◇ **calciopexis** ◇ **kalkiomlenañ** Lenañ ar c'halkiom amredat ouzh anneauenn broteek an askorn.

calciprivic ◇ **calciprivic** ◇ **1 olrazus aa., kalkiomisvec'huis aa. 2 olrazien aa., kalkiomisvec'hien aa. 3 olrazel aa., kalkiomisvec'hel aa.** 1 O tevoudañ nevez ar c'halkiom. 2 Devoudet gant nevez ar c'halkiom. 3 A-geñver gant nevez ar c'halkiom.

calcirachie ◇ ◇ **keinvec'h g. kalkiom, kalkiomgeinvec'h g.** Feur kalkiom el liñvenn benn-kein, ent vonan 1,29 mmol/l (51,5 mg/l), 1,20 mmol/l (48,1 mg/l) ionaet.

calcistie ◇ ◇ **gwiadkalkiomegezh b.** Bezañs kalkiom er gwiadoù.

calcithérapie, chalcithérapie ◇ **calcithérapie** ◇ **kalkiomgurañ** Arverañ yac'hadel an halioù kalkiom.

calcitonine, thyrocalcitonine ◇ **calcitonin** ◇ **kalkitonin g.** Hormon liespeptidek undigorvell, 4500 e dolz mol, ennañ 32 amindrenkenn, bore'het gant kelligoù lez-bolc'h ar skoedenn, o wadisvec'hiañ ar c'halkiom hag ar fosfatoù, o werediñ war ar gwiad askorn dre skoilhañ ouzh an deloezañ osteoklastek, war al lounezh hag ar pervez e kenwered gant ar parathormon dre reoliñ sugañ ha dioulañ ar c'halkiom; dindan 10 pg/mL eo feur reol ar c'halkitonin er plasma; an dezventañ anezhañ a dalvez da zeznaouiñ kankr mezonel ar skoedenn; e ziounit a reer ouzh kleñved Paget.

calciurie ◇ **calciuria** ◇ **troazhvec'h g. kalkiom, kalkiomdroazhvec'h g.** Feur kalkiom dioulet dre an troazh, ent vonan etre 1,25 ha 7,4 mmol/24 h (etre 50 ha 300 mg/24 h).

calc-
 • *calcification de la moelle épinière* razekadur ar mel a-livenn • *calcification progressive* razekaat argammedek • *calculs calciques* grouan razek • *dépôts de sels de calcium* koc'hionadoù halioù razek • *ganglion calcifié* gwerblenn razekaet • *îlots de calcification* enezigoù razekadur • *lithiase calcique* grouanegezh razek • *pancréatite chronique calcifiante* ilgreizfo henek razekaus • *précipitations de sels de calcium* koc'hionadoù halioù kalkiom.

calcul ◇ **calculus** ◇ **grouanenn b. (s. : grouan)** Fetisaenn vaenek danvezioù bevel pe anvevel o tiwanañ en ur ganol, un organ kleuz pe e-barzh forzhioù degorzhañ ur wagrenn.

calculocancer ◇ ◇ **grouangankr g.** Kankr er gellenn vestl pe er c'hanolioù bestl tizhet gant ar c'hrouanegezh.

calibre

• *adapter le calibre des artères* azasaat kavnez an talmerennoù • *bougies de calibre croissant* stilhoù o zreuzkiz war gresk • *diminution du calibre de l'aorte* leiad kavnez an aortenn • *diminution permanente du calibre de l'orifice* leiad padek kavnez ar gwask • *fistule de fort calibre* fic'h a gavnez bras • *réduction du calibre de l'orifice* isdigor eus ar gwask • *réduction du calibre des bronches* leiadur kavnez ar bronkez • *tube de très petit calibre* korzenn munut kenan he c'havnez.

calices : **grands** ~ ◇ **greater calyces (u. calyx)** ◇ **kaliroù l. (g.) bras** Kanolioù degorzhañ al lounezh, teir anezho peurvuiañ, krec'h, etre ha traoñ, o tastum dever ar c'haliroù bihan hag o tinaouiñ el lestr.

calices : **petits** ~ ◇ **lesser calyces (u. calyx)** ◇ **kaliroù l. (g.) bihan** Kanolioù lienennek, un dousenn anezho, enlenet ouzh tro ar begennoù lounezh, anezho rann gentañ forzhioù degorzhañ an troazh, o tifourkañ er c'haliroù bras.

calicectasie ◇ **calicectasis** ◇ **usvoll g. kalir, kalirusvoll g.** Bolc'hadur ur c'hilir lounezh.

calic-

- *cellule caliciforme* kellig kibek.

calirraphie ◇ **calirrhaphy** ◇ **kalirzlita** Ratreañ surjaniel ur c'halir lounezh.

calleux : **syndrome** ~, **syndrome de déconnexion interhémisphérique** ◇ **corpus callosum syndrome** ◇ **azoniad karnegel, aziadiad an digennaskañ etre-hanterennoù** Teskad an azonoù stadet da geñver yoc'hennoù pe anafoù gwazhiedel ar c'horf karnek, anezho strafuilhoù bredel (ankewant, digasted, anevvezh, iskister) ha nerval (andigon, ankedre, a-wechoù gouseizi ha dar-grezad an eizhaennoù).

callite ◇ ◇ **klomenno** g. Tanijenn en ur glomenn askorn.

callosité ◇ **callosity** ◇ **kaledenn** b. Tevaenn fetisaet dec'honet gant ar gwask war ar palvoù, sol an treid pe diaraog an daoulin, anezhi berniadur gweleadoù kornhaen an ez-kroc'henn.

calm-

- *calmer la toux* distav ar paz
- *douleur calmée par le repos* laur distanet gant ar paouez
- *pouls petit et calme* poulz bihan ha reizh.

calmoduline ◇ **calmodulin** (< *calcium modulation*) ◇ **kalmodulin** g. Protein a dolz mol 17 000 d bezant e kitoplasm ar gellig, krafus kenan ouzh ar c'halkiom hag o kendaoliñ da reoliñ ar c'hennevid anezhañ.

calorie ◇ **calory** ◇ **kalori** g. Kementad gwrez ret da zegas ur gramm dour pur eus 14,5°C da 15,5°C dindan an aerwask reol; unanenn dilezet gant ar Vezhuroniezh, erlec'hiet outi ar joul (1 cal = 4,1855 J).

calorifique : **pouvoir** ~ ◇ **calorific value** ◇ **gwrezusted** b. Gwrezad (kementad gwrez, ML^2T^{-2}) laosket dre zeviñ un unanenn dolz eus ur c'horf; ur *gwrezder tolzel* eo (L^2T^{-2}).

calorimètre ◇ **calorimeter** ◇ **gwrezventer** g. -ioù Ardivink da zewerzhañ ar wrezad engwezhet en un treuzfurmadr fizikel pe gimiek, gwreztaolus pe wreztennus, dre vuzuliañ argemmadoù ar gwrezverk e-barzh ur gwrezkenae disfu diouzh an amva.

calorimétrie ◇ **calorimetry** ◇ **gwrezventerezh** g. Hollad ar c'halvezderioù da vuzuliañ an tremen gwrez etre ur c'horf hag e amva; kemm a lakaer etre 1) ar *gwrezventerezh eun* o vuzuliañ ar gwrezadoù en arloc'h en un ec'honenn gloz diwar-bouez kambroù gwrezventañ a vuzulier argemmadoù gwrezverk o speurioù ha 2) ar *gwrezventerezh ameeun* diazezet war vuzuliañ an danveziñ oksigen hag an dilaoskiñ nitrogen hag anhidridenn garbonek.

calorimétrique

- *enceinte calorimétrique* gwrezkenae.

calotte : **syndromes de la** ~ (**pédonculaire**), **syndromes de la** ~ **mésencéphalique** ◇ **tegmental syndromes** ◇ **azoniadoù ar golo (krennempenn)** Teskad ar strafuilhoù diwar anafoù golo ar c'hrennempenn (rannbarzh adreñv troadoù an empenn), o tevoudañ seizioù e kigennoù diavaez ha diabarzh al lagad, o tireizhañ aroulevierezh an analañ, an defroù hag an tant kaherel.

calotte : **syndromes de la** ~ (**protubérantielle**) ◇ **pontine tegmentum syndromes** ◇ **azoniadoù ar c'hil pont** Teskad ar strafuilhoù diwar an anafoù eus rannbarzh adreñv ar pont, anezho direizhoù ilpennel, santadel, lagadel, tizhadur gronnoù ar V¹, VI¹ hag VIII¹ nervenn aglopenn, strafuilhoù an analañ, an hun hag an defroù, kahergridoù ar ouel stavn, ar c'harloc'henn, ar c'hargadenn hag ar gelc'hspeuren.

calpaïne ◇ **calpaïne** ◇ **kalpain** g. Proteaz blivaet gant an ion kalkiom bezant er ruzkelligoù hag ar c'hahergelligoù; diwar un dargenad eus ar c'henenn o vonegañ ar c'harpain e vez mideñvoù kaherel 'zo.

calvitie ◇ **baldness** ◇ **moalded** b. Ezvezañs diwezhel an holl pe an darn vras eus ar blev.

(-)calv-

- *calvitie hippocratique* moalded hipokratek
- *chauve, atteint de calvitie* moal
- *décalvant* moalaus
- *décalvation* moalaat, moal-adur.

camisole de force ◇ **strait jacket** ◇ **rokedenn** b. **vac'h** Chupenn lien gros, outi milginoù kloz hag ereoù, a wisket d'ar glañvourion gefraouat pe darwantus; dilezet e voe en eil hanterenn an 20^t kantved pa zeraouad arverañ ar bredwezherioù — pezh a roas tro da gomz a-zivout ar re-mañ eus “rokedenn gimiek”.

campimètre ◇ **campimeter** ◇ **gwelvaezier** g. -où Trevnad arveret da studiañ ar gwelvaez, anezhañ ur skramm du karrezek 2 m tu a staler 1 m dirak daoulagad ar gouziviad; hemañ a beder da studañ diouzh kreizenn ar skramm ha da c'houzav pa zeraou merzhout ar voull wenn a nesaer tamm ha tamm da greiz ar c'harrez adalek poentoù diseur eus e dro; derc'hennet emañ arregenn ar gwelvaez gant al linenn treset dre ar poentoù ma teraou ar merzhout; *gwelvaeziañ* a reer eus studiañ ar gwelvaez, *gwelvaeziad* eus ar c'hevregad savelet diwar-bouez ar gwelvaezier.

campimétrie ◇ **campimetry** ◇ **gwelvaezierezh** g. Araezad studiañ ha derc'hennañ ar gwelvaez diwar-bouez ar gwelvaezier; gant ar gwelvaezier e c'haller imboure'hiñ ar gwelvaez betek 45°; an hentenn wellañ eo evit studiañ ar skotomoù kreiz ha lez-kreiz; hervez ar skedoù arveret e saveler ar gwelvaeziadoù fotopek, mezopek ha skotopek (sl. *adaptation, champ visuel, périmétrie*).

canal alvéolaire ◇ **alveolar duct** ◇ **san b. al logig** Kanol volbosek o tont da heul ur gorrvronkezenn hag o tifourkañ en ul logig skevent.

canal anal ◇ **anal canal** ◇ **kanol** b. **ar fraezh** Lodenn diwezhañ ar youlc'h, enkoc'h, anvet c'hoazh youlc'h a-c'harbedenn, gronnet gant ur gigenn rizennek, kelc'hstrishaer ar fraezh, en dalc'h serr etre ar c'hac'hadennoù.

- canal artériel** ◇ **ductus arteriosus** ◇ **san dalmerel** Forzh o skoeviñ skevent ar grouell dre amdreugañ gwad an dalmerenn skevent etrezek an aortenn; stankañ a ra da vare ar c'hanedigezh en ur lezel ar stagell dalmerel war he lerc'h.
- canal artériel : persistence du ~** ◇ **persistent ductus arteriosus, patent ductus arteriosus** ◇ **dreistpad g. ar san dalmerel** Anstankadur ar san dalmerel goude ar c'hanedigezh ha bezañ ur skoev kleiz-dehou etre strizh an aortenn ha deroù barr kleiz an dalmerenn skevent, naouus dre ur sourr stlejer; kammneuziad pareadus dre ar surjianerezh (sl. *souffle tunnellaire*).
- canal artériel : ~ systémique, ~ à shunt inversé** ◇ **patent ductus arteriosus with reversed blood flow** ◇ **san dalmerel drogorfat, san dalmerel gant skoev dehou-kleiz, san dalmerenn gant ginskoev** Anv roet d'ar san dalmerel pa gemer perzh en amred trogorfat dre ma 'z a uheloc'h ar gwask en dalmerenn skevent eget en aortenn da heul harzder an talmerennigoù skevent ha, dre se, ma vez skoevet ar gwad anoksigenet etrezek an aortenn a-ziskenn.
- canal artériel vicariant** ◇ **vicarius ductus arteriosus** ◇ **san dalmerel gevelat** San dalmerel o talvout d'un amred skevent klokaat da geñver kalonnaouedoù dulazus 'vez.
- canal auriculoventriculaire : persistence du ~ commun, persistence du canal atrioventriculaire commun, communication interatrioventriculaire, CIAV** ◇ **common atrioventricular canal persistent defect** ◇ **dreistpad ar san voutin kenteziou-kofigoù** Kammneuziad kalon kemplezh o c'hoarvezout eus kevredet ur c'hehentaat etre-kentezoù izel hag ur c'hehentaat etre-kofigoù uhel o furmiñ ur boulc'h ledan boutin etre ar peder c'havenn; war un dro e stader kammneuzioù an trapigoù kentez-kofig kleiz ha dehou.
- canal calcanéen, sinus tarsien** ◇ **tarsal sinus** ◇ **god g. ar souk** Kanol askornstirkaherek o kehentaat ar rannbarzh drekufern diabarzh gant sol an troad, enni stirenoù ar gigenn a-skin adreñv, kigenn bleger hir ar bizied ha kigenn bleger ar meud troad, gwazhied ha nervennoù adreñv ar skin, talmerennoù ha nervennoù ar sol.
- canal calcique** ◇ **calcium channel** ◇ **iongan g. kalkiom** Iongan ma enank drezañ an ion Ca^{++} er gellig (sl. *canal ionique*).
- canal carotico-tympanique** ◇ **caroticotympanic canaliculus** ◇ **kanolig b. karotidenn-taboulin** Kanolig voan o kehentaat kavenn an daboulin ha kanol ar garotidenn, lec'h tremen ar barroù talmerel hag an nervennoù karotidenn-taboulin.
- canal carotidien** ◇ **carotid canal** ◇ **kanol b. ar garotidenn** Kanol ilinek o treuziñ ar garregenn, lec'h tremen ar garotidenn diabarzh gronnet gant ur rouedad wazhiennou hag ar blezhad simpatek tro-garotidenn.
- canal carpien** ◇ **carpal tunnel** ◇ **kanol an arzorn** Kanol askornstirek furmet gant nant an arzorn ha kabestr ar plegerioù, lec'h tremen stirenoù pleger ar bizied, kigenn bleger a-werzhid an arzorn hag an nervenn greizer.
- canal carpien : syndrome du ~, syndrome du tunnel carpien** ◇ **carpal tunnel syndrome** ◇ **azoniad kanol an arzorn** Azoniad amwask an nervenn greizer e-barzh kanol an arzorn; un-pe daoudu, o tont da heul torroù an arzorn, kleñved Paget, ar geurvlēñchegezh, h.a., alies hep arbenn savelet; naouus dre gemenerion ha morzadurioù en noz dreist holl, iseraez ha kammeraez er pevar biz kentañ, isnerzh ar c'higennoù, isteñv ar c'hourbozenn.
- canal cervical étroit** ◇ **narrowing of the cervical vertebral canal** ◇ **enkadur g. kanol mellkein ar gouzoug** Anaéz diwar furmidigezh amdeñvennoù askorn oc'h enkaat kanol ar mellkein gouzoug hag oc'h amwaskañ ar mel a-livenn, naouus dre un azoniad pikernennek argammedek.
- canal cochléaire** ◇ **ductus cochlearis** ◇ **san ar velc'housedenn** Kanol lienennek kengerek endalc'het er velc'housedenn etre al lavnenn viñsek askornek hag ar ganol viñsek; diouti e nod ar gwiennoù avelc'housedenn eus an VIII^e nervenn (pe nervenn gempouez-kleved).
- canal cystique** ◇ **cystic duct** ◇ **san ar gellenn** Kanol an adforzh vestl o keneren mulgul ar gellenn vestl gant ar san avu boutin, endalc'het e-barzh ribl rez an danter bihan.
- canal de Guyon, canal ulnaire** ◇ **ulnar canal** ◇ **kanol a-helmo** Kanol askornstirek e talbenn araok an arzorn, ma tremen ar gwazhied hag an nervenn a-helmo.
- canal de Guyon : syndrome du ~, syndrome du canal ulnaire** ◇ **ulnar canal syndrome** ◇ **azoniad ar ganol a-helmo** Azoniad amwask an nervenn a-helmo e-barzh ar ganol a-helmo, naouus dre gammeraezioù hag a-wechoù iseraez an daou viz diwezhañ, isnerzh hag isteñv kigennoù eus an dorn (etrekernel, nesaer ar meud, gouvozenn).
- canal déférent** ◇ **vas deferens** ◇ **san sper, san dezouger** Kanol gaherlienennek o saniañ ar sper eus lost an argell da ziaz ar raksavenn ma kember gant gouzoug ar gellenn sper da furmiñ ar san strinker.
- canal éjaculateur** ◇ **ejaculatory duct** ◇ **san strinker** Kanol gaherlienennek furmet diwar ar c'hember e-barzh ar raksavenn eus ar san sper hag ar gellenn sper, o tifourkañ er c'han troazh a-raksavenn war dal kostezel turumell ar sper.
- canal épидidymaire** ◇ **canal of epididymis** ◇ **san an argell** Kanol droiellek ha goustellet o vont d'ober an argell, a-ser gant ar gwiad kenglenel en dro dezhi; he roll eo saniañ sper ar glidenn eus ar sanigoù ezkas d'ar san sper.
- canal fémoral** ◇ **femoral canal** ◇ **kanol ar vorzhed** Kavn stirek ma tremen gwazhied ar vorzhed, dezhañ furm ur c'hengereg tric'hornek, gweet en-dro d'e ahel, astennet etre gwalenn ar vorzhed ha grem stirenek an nesaer; teir rann ouzh he ober : uhelañ, izelañ (pe ganol an nesaerioù), hag etre (e lodenn draoñ tric'hogn ar vorzhed).
- canal galactophore** ◇ **lactiferous duct** ◇ **san laezhkaser** Kanol degorzhañ pep flipezenn vronn o tifourkañ er beg bronn dre ur savnig laezhkaser.

- canal hépatique** ◇ **common hepatic duct** ◇ **san avu, san avu boutin** Forzh vestl amparet diwar ar c'hember e porzh an avu eus an div san avu dehou ha kleiz, oc'h ober lodenn gentañ ar bennforzh vestl o tibenniñ e difourk ar san gellenn.
- canal hépatique droit** ◇ **right hepatic duct** ◇ **san avu dehou** Forzh vestl o kas ar vestl adalek tolbezenn dehou an avu betek ar bennforzh vestl, o tisoc'h eus kember an div ganol rannel lez-kreizer ha kostezel dehou.
- canal hépatique gauche** ◇ **left hepatic duct** ◇ **san avu kleiz** Forzh vestl o kas ar vestl eus tolbezenn gleiz an avu d'ar bennforzh, furmet diwar gember an div ganol rannel lez-kreizer ha kostezel kleiz.
- canal inguinal** ◇ **inguinal canal** ◇ **kanol ar varlenn** Entremez kaherek hoskerek, a-veskell war draoñ, war raok ha war ziabarzh, lec'hiet e traoñ speur araoek ar c'hof; drezi e tremen ar funig sper gant ar gour, ar stagell ront gant ar vaouez.
- canal ionique** ◇ **ion channel** ◇ **iongan g. -ioù** Savnig loet e-barzh molekul protein 'zo eus kennenn ar gellig, lec'h treizhañ (enankañ hag ec'hankañ) an ion; emañ an digorded anezhi e dalc'h bleinegezh ar gennenn pe krafadur ul ligand ouzh buzer an iongan; spesadel e vez pep savnig d'ur seurtad ion (Na^+ , K^+ , Ca^{++} , Cl^-); liaoù galer ha gourzhaler d'an ionganou a arverer er Yac'hadouriezh.
- canal lacrymonasal membraneux** ◇ **nasolacrimal duct** ◇ **san a-fri an daeroù** Kanol liennnek o kas an daeroù adalek sac'h an daeroù betek ode draoñ ar fri.
- canal lacrymonasal osseux** ◇ **nasolacrimal duct** ◇ **kanol a-fri an daeroù** Kanol askornek furmet gant askorn an daeroù, ar garvan ha krogen grec'h ar fri, enni san a-fri an daeroù.
- canal lombaire / lombal étroit / rétréci, sténose du canal lombaire / lombal** ◇ **narrowing of the lumbar vertebral canal** ◇ **enkadur g. kanol mellkein an dargreiz, isvoll g. kanol an dargreiz** Anaez diwar strizhded kanol an dargreiz, ganediged pe arzeuat (diskoù gweuzek pe amdeñvennoù askorn) oc'h amwaskañ ar gwriziennoù nervek, naous dre varradoù mavigamm ha kleññ spanaus.
- canal médullaire** ◇ **medullary cavity** ◇ **kavenn b. ar mel** Kavenn greiz an eskern hir leun gant ar mel melen.
- canal nourricier** ◇ **nutrient canal** ◇ **kanol vogañ** Kanol hirvoan o sankañ betek kavenn vel an eskern hir, enni talmerenn vogañ an askorn.
- canal optique** ◇ **optic foramen** ◇ **kanol ar gweled** Kanol askornek furmet gant gwriziennoù askell vihan ha korf ar genneg, enni nervenn ar gweled ha talmerenn al lagad.
- canal palatin antérieur** ◇ **incisive canal** ◇ **kanol ar rakdent** Kanol askornek ampar lec'hiet etre balegoù a-stavn ar garvan, enni ar gwazhied hag an nervennoù a-stavn.
- canal palatin postérieur** ◇ **palatine canal** ◇ **kanol ar stavn** Kanol askornek lec'hiet etre talbenn diabarzh ar garvan ha lavnenn a-serzh an askorn stavn, enni talmerenn a-ziskenn ar stavn ha nervenn araoek ar stavn.
- canal potassique** ◇ **potassium channel** ◇ **iongan kaliom** Iongan ma ec'hank drezañ an ion K^+ eus ar gellig; enepmigorvez e vez ar gourzhalerioù dezhañ, gwazhiedfrankaus ar galerioù (sl. *canal ionique*).
- canal ptérygo-palatin** ◇ **pterygopalatine sulcus** ◇ **nant elvenneg-stavn** Kanol askornek furmet gant baleg a-c'hennek an askorn stavn ha baleg gouinek ar genneg, enni an dalmerenn elvenneg-stavn ha nervenn ar c'hargadenn.
- canal pylorique** ◇ **pyloric canal** ◇ **kanol ar porzhier** Lodenn dibenn, traoñ ha dehou ar stomok, a-geñver gant kigenn gerc'hstrishaer ar porzhier, o vont he oaled war enkaat adalek ar vougev betek gwask ar porzhier.
- canal rachidien** ◇ **vertebral canal** ◇ **kanol ar mellkein** Kanol askornstagellek furmet gant steudad an toulloù mellen hag ar stagelloù o keneren gwaregoù adreñv ar mellennoù, enni ar mel a-livenn, ar pilhon hag ar gwriziennoù a-livenn; e-krec'h e tifourk en toull bras.
- canal sacré** ◇ **sacral canal** ◇ **kanol ar groazell** Kanol askornek lec'hiet a-zerc'h e diabarzh askorn ar groazell, anezhi parzh traoñ kanol ar mellkein.
- canal semi-circulaire latéral (membraneux), canal semi-circulaire externe (membraneux), canal semi-circulaire horizontal (membraneux)** ◇ **lateral semicircular duct** ◇ **san hantergela'hiek kostezel (SHKO)** Organ liennnek a-zremm o perzhiañ en arc'hwel ar c'hempouezañ, dezhañ stumm ur ganol granennek kromm evel un houarn marc'h, o tifourkañ er grozhig; eus ur gloestr en e benn araoek e nod gwiennoù eus an VIII^e nervenn; endalc'het emañ an SHKO en ur ganol askornek e diabarzh ar garregenn, ar *ganol hantergela'hiek kostezel* (KHKO); etre ar ganol askornek hag ar san liennnek emañ an amzourenn (pe perilimf).
- canal semi-circulaire postérieur (membraneux)** ◇ **posterior semicircular duct** ◇ **san hantergela'hiek adreñv (SHAD)** Organ liennnek a-zerc'h, dezhañ an hevelep doareoù hag ar san hantergela'hiek kostezel; endalc'het emañ an SHAD er *ganol hantergela'hiek adreñv* askornek (KHAD).
- canal semi-circulaire supérieur (membraneux)** ◇ **superior semicircular duct** ◇ **san hantergela'hiek araoek (SHAR)** Organ liennnek a-zerc'h, loet a-serzh war ahel bras ar garregenn, dezhañ an hevelep doareoù hag ar san hantergela'hiek kostezel; endalc'het emañ an SHAR er *ganol hantergela'hiek araoek* askornek (KHAR).
- canal sodique** ◇ **sodium channel** ◇ **iongan natriom** Iongan ma enank drezañ an ion Na^+ er gellig; e-touez ar gourzhalerioù dezhañ ez eus liaoù diaraezec lec'hiek (*lidokain*), enepmigorvez (*kinidin*), enepkrid (*karmazepin*), troazhusvorc'her (*amilorid*) (sl. *canal ionique, pompe à sodium*).

canal sous-orbitaire ◇ **infra-orbital canal** ◇ **kanol is-pod** Kanol askornek e diabarzh baleg a-voc'h ar garvan, enni ar gwazhied hag an nervennoù is-pod.

canal thoracique ◇ **thoracic duct** ◇ **san ar brusk** Kanol vras a 'l limf o tisoc'h eus kember an daou gef a-zargreiz hag o kas an holl limf is-kelc'hspereunn adalek o Glenn ar sugenn (pa vez anezhi) betek ar wazhienn endan-drebez kleiz, ma tifourk dre gember Pirogoff goude treuziñ kavenn adreñv ar poullkreiz en he fezh hag ar poull us-trebez bras.

canal vagino-péritonéal ◇ **processus vaginalis of peritoneum** ◇ **askouezh g. gouinek an ampeleñ** Kanol o kehentaat kavenn vras an ampeleñ ha gouinsae ar glidenn, o vont anforzhiek ent reol d'ar c'handedgezh en ur lezel stagell Clocquet da aspadenn war he lerc'h; en degouezhioù ezreol ma chom forzhiek, e ro tro d'an avelennoù a-varleñ ganedigel.

canal vertébral ◇ **vertebral artery canal** ◇ **kanol talmerenn ar mellkein** Tachad korfadurel ma tremen talmerenn ar mellkein, o teraouiñ e toull baleg treuz ar c'hwec'hvet mellenn c'houzoug, gronnet gant balegoù treuz ar c'hwec'h mellenn gentañ hag, etrezo, gant kigennoù ar balegoù treuz.

canal vidien ◇ **pterygoid canal** ◇ **kanol an elvenneg** Kanol askornek o treuziñ diaz ar baleg elvennek, enni gwazhied ha nervenn kanol an elvenneg.

canalicule biliaire ◇ **bile canaliculus** ◇ **kanolig b. ar vestl** Forzh vunut, hep speur piaouel, etre ar c'helligoù avu, o tastum hag o wehenniñ ar vestl etrezek ar forzhioù bestl.

canalicule lacrymal, conduit lacrymal ◇ **lacrimal canaliculus** ◇ **kanolig an daeroù** Kanol endalc'het e ribl rez pep malvenn o kas an daeroù eus al lagad da sac'h an daeroù dre hantererezh ur genganol furmet diwar gember kanolig daeroù ar valvenn grec'h ha hini ar valvenn draoñ.

canaliculite ◇ **canalculitis** ◇ **kanoligfo g.** Tanijenn kanolig degorzhañ ur wagrenn; peurliesañ e virer an termen evit tanijenn ar ganolig daeroù.

canaliculotomie ◇ ◇ **kanoligenbenañ** Digeriñ surjaniel kanolig an daeroù.

canaux dentaires ◇ **dental canaliculi** ◇ **kanoligoù an dent** Kanolioù askornek e diabarzh an divaven o tifourkañ e deun al logigoù dent, enno gwazhied ha nervenn an dent.

canal(-)

- *canal biliaire* forzh vestl
- *canal d'union* kenganol
- *canal de Wharton et canal de Rivinus* sanig Wharton ha sanig Rivinus
- *canal excréteur* kanol degorzhañ
- *canalicule excréteur* kanolig degorzhañ
- *canalicule intracytoplasmique* kanolig enkitoplasmel
- *canalicules biliaires* kanoligoù bestl
- *canalicules qui drainent les produits de sécrétion d'une glande exocrine* kanoligoù gwehenniñ ur wagrenn ezvorc'hañ
- *canaux biliaires intrahépatiques* kanolioù bestl enavuel
- *canaux sudorifères* sanioù ar c'hwez
- *formation canaliculaire* furmadur kanoligek.

caner, tumeur maligne, néoplasme malin ◇ **cancer** ◇ **kankr g., yoc'henn b. yud, nevezwe g. yud, hanwe g.** Yoc'henn diwar neridigezh antrevnek kelligoù anreol oc'h aloubiñ hag o wastañ ar gwiad pe ar flugezenn ma teñv, ganti an doug da skignañ dre ar bevedeg (dassezioù) ha da adfeilhañ goude bezañ dilamet pe distrujet; dindan an termen *kankr* e renker an holl neridigezhioù yoc'hennus yud, forzh pere ve stad diorren (rizhellel pe oadourel) ha rizeh ar gwiad ma evodont; niverus hag anavezet fall eo arbennoù ar c'hankroù: goudrevn hêzezhel o kenttuañ d'an hanweoù, parennoù trevvael, kimiek evel an ter hag ar butun, skinadoù, viruzoù, hinadoù, boazioù emvagañ, h.a.; hervez o rizeh gwiadurel e tiforc'her ar *c'harkinomoù* pe kankroù epitelel pe epiteliomoù, dispaket diwar goust an amwiskadoù hag ar parenkimoù, ar *sarkomoù* pe yoc'hennoù mezenkimatus yud, a orin kenglenel, en o zouez sarkomoù ar gwagrennoù levrus pe *mezoteliomoù yud*, ar *melanomoù*, ar *yoc'hennoù nerval yud*, an *dizembrियोमो*, ar *yoc'hennoù torzhiennel*; an adanv *yud* hag ar pennanv *yuter* a empleg un niver a naouusteroù meurselladel, gwiadurel ha dedroadel hep rakvarn war ar c'hrevusted: marvus e c'hell bezañ yoc'hennoù kuñv (da skouer ar meningiom oc'h amwaskañ an empenn), endra vez kuradus un niver yoc'hennoù yud (ne vez koulz lavaret nepred dallezioù diwar epiteliomoù diazkelligel ar c'hroc'hen).

cancéreux ◇ **1 3 cancerous 2 cancer patient** ◇ **1 kankrek aa., hanweek aa. 2 kankreg g. -eion 3 kankrel aa., hanweel aa.** 1 Gant ar c'hankr. 2 Gouziviad ar c'hankr. 3 A-zave d'ar c'hankr.

cancérisation ◇ **canceration** ◇ **kankraat, hanweaat** Mont da gankrek a-zivout kelligoù bonan.

cancérogène, carcinogène ◇ **cancerogenic** ◇ **1 kankreiat aa. 2 kankreiad g. -où** 1 En araez da zec'han dinodadur ar c'hankr. 2 Danvezenn gankreiat.

cancérogénèse, carcinogénèse ◇ **cancerogenesis** ◇ **kankrardarzh g.** Teskad ar gwikefreoù o wezhiañ e dinodadur ar c'hankroù.

cancérologie, carcinologie, oncologie ◇ **cancerology, oncology** ◇ **kankrouriezh b.** Diskiblezh vezegel o plediñ gant ar c'hankroù.

cancérologique ◇ **cancerologic** ◇ **1 kankrourel aa. 2 kankrel** 1 A-zave d'ar gankrouriezh. 2 A-zave d'ar c'hankr.

cancérologue ◇ **cancerologist** ◇ **kankrou g. -ion** Mezeg arbennigour war ar c'hankroù.

cancérophobie ◇ **cancerophobia** ◇ **kankrarur g.** Amgren enkreuz ha disol da gaout ar c'hankr.

cancroïde ◇ **cancroid** ◇ **kankroid g.** Seurtad epiteliom gourc'hennelligel angreizhek o tedeññ gorrek, sezet en dremm peurliesañ.

cancér-

• *division des cellules cancéreuses* emrannañ ar c'helligoù kankrek • *infiltration cellulaire, inflammatoire ou cancéreuse* ensiladur kelligoù, foel pe gankrek • *tumeurs non cancéreuses* yoc'hennoù ankankrek.

candela ◇ **candela** ◇ **kandela** g. Unanenn luc²hskinread (ML²T⁻³, arouez : cd), despizet : ur c'horf du kaset da wrezverk sonnennañ ar platin (2 028 °K) zo dezhañ ur sked 60 kandela dre cm².

Candida ◇ **Candida** ◇ **Candida** g. Genad govev (foue blastoforek) o tiñvañ war metoù Sabouraud e rezh kludadou gwenn diennheñvel ha, goude azhadañ, un edañvad dezverkus gant klamidospo bras ; ar spesadoù arvevat ouzh mab den zo peurliesañ *Candida albicans*, *Candida tropicalis*, *Candida pseudotropicalis*, *Candida krusei*.

candidacide ◇ ◇ **kandidalazh** aa. En araez da lazhañ ar govevion a rizh *Candida*.

candidose ◇ **candidiasis** ◇ **kandidiaz** g. Teskad ar c'hleñvedoù diwar foue blastoforek a 'r genad *Candida* (*Candida albicans* peurliesañ) kerc'hus d'ar c'hroc'hen ha d'ar glaourgennoù (borb, teod du bodennek, mezenno, kourzhgouinfo, fraezhfo, tizhad ar plegoù bras : barlenn, kazel, bronn, begel, plegoù etre-bizied).

candidurie ◇ **candiduria** ◇ **troazhkandidegezh** b. Bezañs en troazh eus foue blastoforek a 'r genad *Candida*.

canine, **dent canine** ◇ **canine tooth** ◇ **ankdant** g. **ankdent** Pep hini eus ar pevar dant loet etre ar rakdent hag an dent rak-maler, outañ ur gurunenn e stumm ur bikernenn bevarc'horn (dent unvroudek) hag ur wrizienn arblat (dent unsikek).

canitie ◇ **canities**, **greying of the hair** ◇ **1 pennwenniñ** **2 pennwenni** g., **gwenni** g. 1 Dislivañ ar blev betek ar gwenn, hollet pe darnel, kozhiadel, hêrezhel pe azoniek. 2 Stad disoc'h ar pennwenniñ ; pa nad a ket an dislivañ pelloc'h eget al louet, e komzer a *louedni* g.

cannabinoïde ◇ **cannabinoid** ◇ **kanabinoid** g. Danvezenn vredviretis bezant er c'hanab indian (*Cannabis sativa*).

cannabiose ◇ **weavers' cough** ◇ **kouarc'heufflegezh** b., **analuzoregezh** b. **diwar gouarc'h**, **paz** g. **ar wiaderion (gouarc'h)**, **kanastregezh** b. Skeventad diwar zewentañ antigenoù bevel a orin struzhel, a-geñver gant ardizh an uzor kouarc'h.

cannabis : **composants du ~** ◇ **cannabinoids** ◇ **kedrannoù** l. (b.) **ar c'hanab (indian)**, **kanabaozadoù** l. (g.), **kanabinoidoù** l. (g.) Danvezennoù trezerc'heiat bezant er c'hanab indian (*Cannabis sativa*).

cannabisme, **haschichisme** ◇ **cannabism** ◇ **kanabegezh** b., **hachichegezh** b. Pistriadur dre ar c'hanab indian (*Cannabis sativa*, hachich, kif, maric'huana) chaoket pe mogedet ; heñvel en e furn lemm ouzh ar mezvadur alkoolel : da gentañ ul lankad broudedigezh, direizhoù skiantennel ha kantaezel, ul lankad gouvid da heul ; en e furn henek e stader azoniadoù psikozel : mania, alfo lemm, arluz, distroll ar me.

canne ◇ **stick**, SzAm. : **cane** ◇ **bel** b. -où Harp arc'hwelel d'ar bale, anezhañ ur c'harenn goad, metal pe mezell outi un dornell en he fenn krec'h (sl. *béquille*).

canne tripode, **canne tétrapode** ◇ **three-legged cane**, **tripod cane**, **fourlegged cane**, **tetrapod cane** ◇ **bel drifav**, **bel bevarfav** Bel vetal outi tri pe bevar zroad evit diogeliñ he stabiled.

canon à électrons, **canon électronique** ◇ **electron gun** ◇ **saezher** g. -ioù **elektron** Trevnad o c'henel hag o tolpañ un hordennad elektron ha, diouzh ret, en araez da argemmañ al load hag ar read anezhi.

cantholyse ◇ **cantholysis** ◇ **ezglenañ freilh (ar malvennoù)**, **freilhezglenañ** Distagañ freilh ar malvennoù diouzh e ereoù, gwezhiadenn a rener da geñver seurtoù 'zo a atelviñ pe a asparañ ar malvennoù (sl. *blépharoplastie*).

canthopexie ◇ **canthopexy** ◇ **Aanlenañ freilh (ar malvennoù)**, **freilhAanlenañ** Gwezhiañ surjaniel, anezhañ treuzlec'hiañ war grec'h ha war ziaevaz freilh ar malvennoù.

canthoplastie ◇ **canthoplasty** ◇ **atelviñ freilh (ar malvennoù)**, **freilhatelviñ** Adkempenn surjaniel freilh ar malvennoù.

canthorrhaphie ◇ **canthorrhaphy** ◇ **dlita freilh (ar malvennoù)**, **freilhdlita** Malvenndlita pe tarsdlita bevnetet da freilh ar malvennoù (sl. *blépharorrhaphie*, *tarsorrhaphie*).

canthotomie ◇ **canthotomy** ◇ **enbenañ freilh (ar malvennoù)**, **freilhenbenañ** Digeriñ surjaniel freilh ar malvennoù.

canthus, **commisure des paupières** ◇ **canthus** ◇ **freilh** g. **ar malvennoù** Kogn diabarzh pe diavaez luniet gant kenuniadur an div valvenn.

canule ◇ **cannula** ◇ **korzan** g. -où Pib reut pe vouk, eeunennek, kromm pe ilinek, arveret da reiñ hent d'un aezhenn pe d'ul liñvenn trema ur gavenn pe ur ganol naturel, ur wazhiedenn pe ur ganol diraezet ent surjaniel (sl. *trocart*).

capacitance, **réactance condensive**, **condensance** ◇ **condensance** ◇ **adharzded** b. **douenel** Luzded un dougell (UI⁻¹), dewerzhed dre omoù (arouez : Ω).

capacitation ◇ **capacitation** ◇ **araezusaat** Anadenn treuzfurmiñ an akrozom, anezhi lemel an heudiñ, o lakaat ar spergellig en araez da frouezhigañ pa zegouezh er gouin pe er grozh.

capacité, **condensateur** ◇ **capacitor** ◇ **dougell** b., **tredandougell** b. Ardivink amkanet da enderc'hel ur bec'hiad tredan.

capacité d'un accumulateur ◇ **capacity of an accumulator** ◇ **bec'hiad** g. **un daspugner**, **tredanvec'hiad** g. Kementad gremm (pe tredanad, IT, Q) a c'hell un daspugner pourchas, dewerzhed dre goulomboù (arouez : C).

capacité électrostatique ◇ **capacitance** ◇ **dougogi** b. Keñver etre ar bec'hiad en un dougell pe en ur reell (U⁻¹IT) hag ar c'hemm barr etre lavnennoù an dougell pe etre pennoù ar reell diskour (unanenn : ar farad, arouez : F).

capacité inspiratoire ◇ **inspiratory capacity** ◇ **barr g. enanalañ** Sammad an ec'honad red hag an ec'honad mir enanalañ (ent keitad, 2,4 l gant ar vaouez, 3 l gant ar gour).

capacité maximale de réabsorption ou d'excrétion tubulaire (Tm) ◇ **maximal tubular reabsorption or excretion (Tm)** ◇ **barr dassugañ tuellennel, barr degorzhañ tuellennel (Tm)** Kementad uc'hek eus un danvezenn a c'hell hollad an tuellennoù lounezh dassugañ (Tm dassugañ) pe degorzhañ (Tm degorzhañ) e-doug ur munud; da skouer, barr dassugañ tuellennel ar glukoz (TmG) zo e-tro 375 mg/min gant ar gour, 303 mg/min gant ar vaouez.

capacité pulmonaire totale (CT) ◇ **total lung capacity (TLC)** ◇ **barr skevent hollel (TLC)** Ec'honad aezhenn endalc'het gant ar skevent e dibenn un enanalad uc'hek, par eo enta da sammad ar *barr bevadel* hag ar *barr dilerc'h arc'hwelel* pe *ec'honad dilerc'h*.

capacité pulmonaire totale <i>barr skevent hollel</i>			
		capacité vitale <i>barr bevadel</i>	
volume résiduel <i>ec'honad dilerc'h</i>	volume de réserve expiratoire <i>ec'honad mir ec'hanalañ</i>	volume courant <i>ec'honad red</i>	volume de réserve inspiratoire <i>ec'honad mir enanalañ</i>
capacité résiduelle fonctionnelle <i>barr dilerc'h arc'hwelel</i>		capacité inspiratoire <i>barr enanalañ</i>	

capacité résiduelle fonctionnelle ◇ **functional residual capacity** ◇ **barr dilerc'h arc'hwelel** Ec'honad aezhenn endalc'het gant ar skevent e dibenn un enanalad reol, par eo enta da sammad an *ec'honad mir ec'hanalañ* hag an *ec'honad dilerc'h*.

capacité vitale ◇ **vital capacity** ◇ **barr bevadel** Brasañ ec'honad analadel deloc'hadus, eleze an ec'honad uc'hek aezhenn a c'haller ec'hanalañ goude un enanalad helc'het hep bevennañ pad an ec'hanalañ, par da sammad an *ec'honad mir enanalañ*, an *ec'honad red* hag an *ec'honad mir ec'hanalañ*.

capa-

• *capable de clarifier un sérum* en araez da voullaat ur gwadveiz • *capacité d'absorption du charbon activé* desunusted ar glaou blivaet • *capacité d'une substance à susciter une réponse immunitaire* araezusted un danvezenn da zec'han un erwezhangaeel • *capacité de diffusion pulmonaire* barr skignañ ar skevent • *capacité de travail* gouested da labourat • *capacité du sang à coaguler* perzh ar gwad da gaoulediñ • *capacité fonctionnelle* gouested arc'hwelel • *capacité professionnelle* gouested vicherel • *substance capable de lyser les caillots sanguins* danvezenn en araez da loezañ ar c'haouled gwad • *variations de capacité d'un condensateur* argemmadou dougogi un dougell.

cape apicale ◇ **apical ridge** ◇ **kabell g. kern** Tevaenn ektoblastek loet e kern nov un ezel o reoliñ diforc'hekaat ar mezoblast danlec'hiet.

cape cervicale, vimule ◇ **cervical cap** ◇ **kabell gouzoug** Stevell venevel arloet ouzh gouzoug ar grozh.

capillaire(s) ◇ **1 2 4 capillary 3 capillary vessels, capillaries** ◇ **1 brigerennek aa. 2 brigerennel aa. 3 korrwazhied s. 4 korrwazhiedel** 1 Dezhañ kavnez ur vrigerenn, eleze munut kenan. 2 A-zave d'ar brigerennoù. 3 Gwazhied munut o c'havnez (10-15 µm) o keneren skoultrennadurioù diwezhañ an talmerennigoù ha skoultrennadurioù kentañ ar gwazhiennigoù, kenetre-dasforzhet puilh e stumm ur rouedad; en o far e c'hoarvez an eskemmoù analadel ha mezhurel etre ar gwad amredat hag ar gwiadoù eroueriet; o speur, hep kaherwiennoù, zo anezhi un endotelienn o c'holeiñ un diazkennenn gronnet pe get gant ur beritelienn. 4 A-zave d'ar c'horrwazhied.

capillaires continus ◇ **continuous capillaries** ◇ **korrwazhied dlided** Rizh korrwazhied paot er bevedeg, o c'hoarvezout eus ur speur endotelienn diode hag ul lavnenn diaz gronnet pe get gant perikit.

capillaires fenêtrés, capillaire à pores ◇ **fenestrated capillaries** ◇ **korrwazhied bualierek** Rizh korrwazhied bezant en organoù ma vez eskemmoù paot a liñvennoù (rouedad tolgennek, gwagrennoù enborc'hañ, lounezhi), treuzet kitoplasm kelligoù endotelel ar speur anezho gant boulc'henoù krenn, pe savnigoù, digor pe stanket gant ur stiv moan.

capillaires de jonction ◇ **junction capillaries** ◇ **korrwazhied skoeviñ** Rizh korrwazhied, enno kahergelligoù lev, o c'hoari ur roll heptreugañ dre reoliñ kas ar gwad en naoz korrwazhiedel end-eeun.

capillaires lymphatiques ◇ **lymph capillaries** ◇ **korrwazhied limf** Forzhioù brasoc'h o c'havnez eget hini ar c'horrwazhied gwad, spanaennek o diazkennenn, dall o fenn kentañ, o roll gwehenniñ ar metoù diabarzh.

capillaires sinusoides, capillaires discontinus ◇ **sinusoidal capillaries** ◇ **korrwazhied spanaennek** Rizh korrwazhied gwad bezant en organoù retikulohistiokitel kefridiet da barañ ha da loezañ elfennoù luniek ar gwad (felc'h, mel eskern, avu);

c'hoarvezout a ra o speur eus ur goload spanaennek a gelligoù arblat a orin retikulohistiokitel o c'hourvez e lec'hiennoù 'zo war un diazkenne spanaennek.

capillaire : **constante** ~, **tension superficielle** ◇ **capillary constant, surface tension** ◇ **arstalenn b. silluskañ, tennder g. gorre** Nerzhder regel (MT^{-2}) naouus da bep liñvenn; da skouer, tennder gorre an dour zo $76.10^{-5}N/cm$.

capillaire : **électromètre** ~ ◇ **capillary electrometer** ◇ **tredanventer g. -ioù silluskañ** Ardivink o korvoñ anadennoù an tredansilluskañ da vuzuliañ ar c'hemoù barr munut.

capillaire : **force** ~ ◇ **capillary force** ◇ **nerzh g. silluskañ** Nerzh o werediñ e gorre ul liñvenn dre enebañ ouzh muiaat ar vent anezhañ : $f = Al$, A o vezañ an arstalenn silluskañ pe tennder gorre, l ment nep regenn eus ar gorre.

capillaire : **tube** ~ ◇ **capillary tube** ◇ **korzenn b. vrigerennek, brigerenn b.** Nep korzenn bihan a-walc'h he c'havnez evit ma ve anat enni gwered an nerzh silluskañ.

capillarimètre ◇ **capillarimeter** ◇ **silluskventer g. -ioù** Ardivink da vuzuliañ an nerzh silluskañ.

capillarirose ◇ **capillariosis** ◇ **kapillarioz g.** Arvevadegezh denel naouus dre strafuilhoù koazhadel diwar breñved eus ar genad *Nematod (Capillaria hepatica* pe *Capillaria philippensis*).

capillarite ◇ **capillaritis** ◇ **korwazhiedfo g.** Anafoù lemm pe henek e gwazhiedoù bihan ar c'hroc'hen (korwazhied, talmerennigoù, gwazhiennigoù, plezhad wazhiennel gorre), stadet en un niver a anaezadoù : eritem, purpura, breinged gorre.

capillarité ◇ **capillarity** ◇ **1 brigerennegezh b. 2 silluskañ 3 Silluskadoniezh b.** 1 Doare ur gorzenn munut he c'havnez. 2 Anadenn o c'hoarvezout e gorre al liñvennoù e diastok ur sonnenn diwar wered nerzhoù ketael; erzerc'hañ a ra dre bignidigezh ul liñvenn e-barzh ur vrigerenn hec'hleb (pe en ur metoù splu), dre un isliveañ en ur vrigerenn angleb. 3 Rann eus ar Fizik, studi anadennoù ar silluskañ.

capillarodynamomètre ◇ **capillarodynamometer** ◇ **harzventer g. -ioù korwazhied** Ardivink da andalañ breskted ar c'horwazhied, dre stadañ derez ar purpura dec'hanet diwar-bouez ur vandoz arloet ouzh ar c'hroc'hen; ent vonan, pa ziskenn ar gwask da 300 mmHg ne zeu ket ouzhpenn 5 fennigenn war wel.

capillaroscopie, microangioscopie ◇ **capillaroscopy** ◇ **korwazhiedsellin** Hentenn arsellin war ar bev korwazhied an donenn pe glaourgenn ar gevresae diwar-bouez ur c'horrgresker.

capill-

- *atonie capillaire* antant korwazhiedel
- *bloc alvéolocapillaire* isfu logigoù-korwazhied
- *électrocapilla-rité* tredansilluskañ
- *fragilité capillaire* breskted ar c'horwazhied
- *lit capillaire* naoz korwazhiedel.

capitation ◇ **capitation** ◇ **pennbuziañ, pennbuz g.** Reizhiad kevuziañ ar vezeion, gopr treiadek talet d'ar mezeg a-gevreizh gant niver ar glañvourion enskrivet war e roll gouziviaded.

capitonnage ◇ **capitonnage** ◇ **bourellañ** Araezad surjaniel evit kas da get ur gavenn (darvoll, loezenn goude ezvenañ ur c'hist) dre lakaat stok ha stok ha krafaelañ ar speurioù anezhi.

capitonnage

- *capitonnage douloureux de la cellulite sur les cuisses* bourelladur laurus ar behindoñv war an divvorzhed.

capnie ◇ ◇ **karbovec'h g.** Feur an dioksidenn garbon e plasma ar gwad.

capnimétrie, carbométrie ◇ **capnometry, carbo(no)metry** ◇ **karboventerezh g.** Muzulierezh bec'h an dioksidenn garbon er meskadoù aezhel hag el liñvennoù.

capn-

- *hypercapnie, hypocapnie, normocapnie* karboüsvec'h, karboisvec'h, karbohevec'h.

capsule ◇ **capsule** ◇ **1 pourc'had g. -où 2 kloran g. -où** 1 Luniad korfadurel stalet e stumm ur c'holoenn. 2 Furm apotikel o c'hoarvezout eus ur golo kloz kranennek, pellennek pe viheñvel, da vezañ dispennet dindan wered ar sugoù koazhañ ha da zilaoskiñ e-barzh ar ganol vezhur ar gwezher endalc'het ganti (sl. *cachet, comprimé, gélule*).

capsule articulaire ◇ **articular capsule** ◇ **pourc'had kenvell** Gronnenn stirek enlenet ouzh ardroioù an talbennoù kenvell, o kendaoliñ d'o derc'hel e diastok.

capsule bactérienne ◇ **bacterial capsule** ◇ **uzenn (s. : uz) vakteri** Gwiskad gwareziñ en dro da vakteri diloc'h 'zo.

capsule externe ◇ **external capsule** ◇ **pourc'had diavaez** Steuñvenn wenn loet etre ar gronn ferek en diabarzh hag ar gael en diavaez.

capsule extrême ◇ **capsula extrema** ◇ **pourc'had eizhañ** Pont steuñvenn wenn loet etre an enezenn en diavaez hag ar gael en diabarzh.

capsule interne ◇ **internal capsule** ◇ **pourc'had diabarzh** Tachad steuñvenn wenn loet etre an derc'hvel ha penn ar gronn lostek en diabarzh, ar gronn ferek en diavaez.

capsule interne : **genou de la** ~ ◇ **genu capsulae interna**e ◇ **glin g. ar pourc'had diabarzh** Lodenn arak ar pourc'had diabarzh dezhi neuz ur c'horn digor war ziavaez, ma tremen ar stirad pluskenn-gronnoù hag ar gwiennoù pluskenn-pont arak.

capsule interne : **syndrome de la ~** ◇ **capsular hemiplegia** ◇ **azoniad ar pourc'had diabarzh, ledseizi g. pourc'h-adel** Teskad an azonou diwar un anaf eus an hordenn bikernennek e-barzh ar pourc'had diabarzh : ledseizi a-eiltu gwak da gentañ, neuze dasstrizhek.

capsulé, encapsulé ◇ **encapsulated** ◇ **pourc'het aa., bolc'hennet aa.** A-zivout ur yoc'henn hevon, gronnet gant ur golo stirek.

capsulectomie ◇ **capsulectomy** ◇ **ezvenañ pourc'had, pourc'hadezvenañ** Dilemel surjaniel, a-zarn, pourc'had ur c'henvell; el Lagadouriezh, dilemel pourc'had ar ferenn.

1 capsulite 2 capsulite, périophtalmite 3 capsulite, tenonite ◇ **capsulitis** ◇ **pourc'hadfo g.** 1 Tanijenn pourc'had ur c'henvell. 2 Tanijenn gouinou ar voull lagad. 3 Tanijenn pourc'had ar ferenn.

capsulorrhaphie ◇ **capsulorrhaphy** ◇ **pourc'haddlita** Krafaelañ pourc'had ur c'henvell, ent dibarek pourc'had kenvell ar skoaz.

capsulorrhexis ◇ **capsulorrhexis** ◇ **pourc'hadedvidañ** Didroc'hañ surjaniel pourc'had arak ar ferenn war-benn digewanañ houmañ.

capsulotomie ◇ **capsulotomy** ◇ **pourc'hadenbenañ** 1 Digeriñ surjaniel pourc'had ur c'henvell. 2 Digeriñ surjaniel pourc'had arak pe adreñv ar ferenn.

capsul-

• *capsule de Bowman* koc'henn Bowman • *capsulite rétractile* pourc'hadfo kurzhidik • *cataracte sous-capsulaire postérieure* ferennlug endan-bourc'had adreñv.

captatif ◇ ◇ **skouldik aa.** Douget da unpioauiñ deur ha karantez an dud all.

capteur ◇ **captor** ◇ **enanker g. -ioù, kaptor g. -ioù** Elfenn gentañ ur ristenn vuzuliañ, houmañ o c'hoarvezout a du 'rall eus un organ treuzkas (trevnad treankañ) hag eus un trevnad lerc'hwezañ; roll an enanker eo danzen arhentou, anezho argemmadou tredan a-gevreizh gant argemmadou an anadenn fizikel pe vevedel imbours'het.

capture ◇ **capture** ◇ **deholiañ** Anadenn o c'hoarvezout e-kerz an distroll kentez-kofig pa vez ur greizenn o vliaat un taread eus ar galon a zo ent voas dindan hol ur greizenn all, da skouer pa vez delanket un argrezad kofig gant ar sistol kentez (*deholiañ ar c'hofig dre draren*), pe un argrezad kentez gant ar sistol kofig (*deholiañ ar c'hentez dre gizren*).

capt-

• *captation rapide des cellules par la rate* degerc'had herrek ar c'helligou gant ar fele'h • *capture d'un électron par le noyau* degerc'hañ un elektronenn gant an derc'han • *capture des bactéries par les phagocytes* pakidigezh ar bakteri gant ar fagokit.

capuchon céphalique, capuchon acrosomial ◇ **acrosomal cap** ◇ **tog g. an akrozom** Furmadr kennek an orin golgiel o kabellañ akrozom ar spergellig.

capuchon muqueux ◇ **pericoronal flap** ◇ **pak g. ar gurunenn** Tamm munso o kabellañ talbenn keharzel an dant o nodiñ.

caractère ◇ **character** ◇ **1 nod g., arouezenn b. 2 doare g., doareenn b., naouuster g. 3 neuzid g.** 1 Elfenn skritur (Moulerezh, Stlenneg, h.a.). 2 Elfenn, merk, tres piaouel d'un dra. 3 Hollad an doareoù piaouel d'un den : tuedoù e gantaezezh hag e gefredelezh, plegoù realezh en e vuhez prevez hag er gedvuhez, hanren e noa, h.a. (sl. *caractères sexuels*).

caractère : **troubles du ~, troubles caractériels** ◇ **behavior disturbance, behavior disorder, emotional problems** ◇ **strafuilhoù l. (g.) neuzid, mineuzid g.** Skalfad gwariadurioù neuzid a stader gant ar vugale pe an oadourion, anezho direizhoù realezh (distabilded, argadusted, gaouvar, troziadezh, h.a.) pe tuadurioù kavet a du 'rall en neurozioù (enkre, gourfromidigezh, arurioù, mac'hennou, h.a.) hag er psikozioù (dougou d'ar gouvid, d'ar vroudedigezh, d'an ambren, h.a.).

caractères sexuels ◇ **sex characters** ◇ **arouezioù l. (b.) revel** Naouusterioù hervez ar rev; kemm a lakaer etre ar *c'henarouezioù revel* (an organoù revel) hag an *eilarouezioù revel*, neuziadurel, bevedourel, bredel.

caractériel ◇ **1 4 characterial 2 with behavioral disorders, (emotionally) disturbed 3 (emotionally) disturbed person** ◇ **1 neuzidel aa. 2 mineuzidek aa. 3 mineuzideg g. -eion 4 mineuzidel aa.** 1 A-zave d'an neuzid. 2 Gant ur mineuzid. 3 Gouziviad ur mineuzid (Sz. *problem child* bugel mineuzidek). 4 A-zave d'ar mineuzid.

caractérologie ◇ **characterology** ◇ **Neuzidoniezh g.** Diskiblezh deniel a zo he amkan deskrivañ ha rummañ an neuzidoù, embreget hervez meur a ziarsell, diouzh ma kreizer an imbours'het war luniad ar personelezhioù (gant amoug ar Vredoniezh hag ar Bredelfennerezh) pe war ur skalfad stadegel a naouusterioù bredel, kreudel, kevredadel war-benn diren liested an neuzidoù hinienel d'un nebeut rizhennoù ha savelañ kefennoù en- pe etrediskiblezhel; alese niver bras ar skolioù Neuzidoniezh adalek an Henamzer betek hiziv.

caracté/èr-

• *anémie caractérisée par une diminution de la teneur en hémoglobine* amwad naouus dre an isvec'h hemoglobin • *caractère héréditaire* doareenn herezhel • *caractères physicochimiques* doareoù fizikel-kimiek • *caractères sexuels masculins et féminins* arouezioù revel gourel ha benevel • *caractères sexuels primaires et secondaires* kentarouezioù hag eilarouezioù revel • *caractérisant les cellules de la médullosurrénale* naouus da gelligoù ar vezonuslounezhenn • *caractérisé par un souffle tunnelaire* naouus dre ur sourr stlejez • *caractériser la tonalité, la saturation et la luminosité d'une sensation visuelle* dezverkañ arne, leunvez ha lugern ur verzhadenn weled • *caractéristique de chaque liquide* naouus da bep liñvenn • *constante caractéristique d'un*

individu arstalenn naouus d'un hinienn • *enfants caractériels* bugale strafuilhet o neuzid • *épilepsie caractérisée par l'obnubilation* droukfell erzerc'h dre ar goabrennegezh • *filamentation caractéristique* edañvad dezverkus.

caraté, pinta, mal del pinto, boussarole, puru-puru, piquite ◇ **pinta, azul, mal de los pintos, boussarole, spotted sickness, pannus carateus, cative** ◇ **pinta g., karate g.** Treponematoz angwenerel broreuziat er gelc'henn etretrovanel en Amerika, diwar an *Treponema carateum* (heñvel ent neuziadurel ouzh an *Treponema pallidum*, gwezher ar sifiliz), naouus ent klinikel dre un dermatoz milivel lec'hiet er poentoù rimiañ, o tedreiñ war dekvloaziadoù, dezhañ an hevelep dazgweredoù hangaeel ha d'ar sifiliz goude ma n'eus hangae kroaziet ebet.

carbamates ◇ **carbamates, carbamic acid esters** ◇ **karbamateier** l. (g. : **karbamat**), **esterioù** l. (g.) **an drenkenn garbamek** Stroll gwezherioù boutin etrezo ar soaz karbamat kentael, diounezet evit o ferzhioù dienkrezer, istantus, enebandag.

carbogène ◇ **carbogen** ◇ **karbogen g.** Meskad aezhel ouzh e ober 95 % oksigen ha 5 % dioksidenn garbon a reer dewentañ d'ar c'houziviaded angwentek pe pistriet gant aezhennoù mougus (kloroform, aezhennoù emgann), roll ar CO₂ o vezañ kentraouñ kreizennoù hirvel an analañ.

carbogénothérapie ◇ **carbogenotherapy** ◇ **karbogensurañ** Prederiañ dre ar c'harbogen.

carbothérapie ◇ **carbonic therapy** ◇ **karbogurañ** Arver yac'hadel an dioksidenn garbon dewentet pe ensinklet endan-groc'henn pe er wazhienn.

carboxyhémoglobine ◇ **carboxyh(a)emoglobin** ◇ **karboksi-hemoglobin g.** Hemoglobin kediet ouzh ar vonoksidenn garbon (CO), a liv ruz kel; 200 gwech brasoc'h eo krafusted ar vonoksidenn garbon ouzh an hemoglobin eget hini an oksigen (O₂), a se ar skoilh ez eo ar CO ouzh lenadur an O₂; marvus e vez ar pistriadur pa sav da 66 % feur an hemoglobin troet e karboksihemoglobin, eleze pa dizh 0,2 % tenor ar CO en aer analet.

carboxylase ◇ **carboxylase** ◇ **karboksilaz g.** Enzim (ligaz) diziouerus da eznevid kelligel ar glukid.

carbo-

- *acide carbonique* trenkenn garbonek (H₂CO₃)
- *carbométrie*, karboventerezh
- *carbonisation des téguments* pulluc'hadur an amwiskadoù
- *dioxyde de carbone, anhydride carbonique, gaz carbonique* dioksidenn garbon, anhidridenn garbonek (CO₂)
- *carbone de silicium* karbidenn silikiom.

carcinoïde : tumeur ~, tumeur argentaffine, ~, argentaffinome ◇ **carcinoid tumor** ◇ **yoc'henn garkinoidel, yoc'henn b. argantlen, karkinoid g., argentafinom g.** Yoc'henn yud, gorrek he dedro, evodet diwar gelligoù argantlen an organoù o tont eus an arc'hpervez (kanol vezhur, briant, bronkez, forzhioù degorzhañ an ilgreiz hag an avu); er pervez (yunegenn, klunegenn, divilhenn) e vez ar gentsez hag en avu, en ampeleñ e vez peurliesañ dassezioù paot; pa gresk ar yoc'henn e tec'han darvoudoù pervezel (steviad, darc'hoal), kennevidel (da heul tizhad an avu), gwazhiedloc'hadel (gwridadoù, dulaz, bleuz) diwar usvec'h ar serotonin borc'het ganti.

carcinome ◇ **carcinoma** ◇ **karkinom g.** Yoc'henn epiteel yud, termen arveret evel kenster da *epitéliom* (sl. *cancer*).

carcinosarcome ◇ **carcinosarcoma** ◇ **karkinosarkom g.** Yoc'henn yud, enni elfennoù epiteel ha mezenkimatus (sl. *cancer*).

carcinose, carcinomatose ◇ **carcinosis** ◇ **karkinoz g., karkinomatoz g.** Kleñved naouus dre ar c'harkinom; ober a reer *karkinoz milier lemm* (Gl. *carcinose miliaire aiguë*) eus aloubidigezh herrek an holl flugez gant dassezioù ar c'harkinom e rezh ur strewad nozelanot.

cardia ◇ **cardia, cardiac orifice** ◇ **gwask g. krec'h (ar stomok), kardia g.** Kehent etre an treizher hag ar stomok, loet e lodenn uhelañ ar c'hrommadur bihan.

cardial ◇ **cardial** ◇ **kardial** aa. A-zave da wask krec'h ar stomok.

1 2 cardialgie 2 précordialgie ◇ **1 2 cardialgia 2 precordialgia** ◇ **1 kardialaur g. 2 rakkalonost b.** 1 Laur e gwask krec'h ar stomok. 2 Laur e rannbarzh ar rakkalon.

1 2 3 4 cardiaque 2 3 cardiopathe 4 cardiogénique ◇ **1 4 cardiac 2 3 cardiopath 4 cardiogenic** ◇ **1 kalonel aa. 2 klañv aa. e galon, kalonglañv aa. 3 klañvour g. -ion kalon, kalonglañv g. -gleñvion 4 kalonien aa.** 1 A-zave d'ar galon. 2 Gant un anaez kalon. 3 Gouziviad un anaez kalon. 4 E dianlen un anaez kalon.

cardiectasie ◇ **cardiectasis** ◇ **kalonusvoll g.** Bolc'hadur darnel pe holl el galon.

cardiectomie ◇ **cardiectomy** ◇ **1 kardiaezvenañ 2 kalonezvenañ** 1 Dilemel surjaniel gwask krec'h ar stomok. 2 Dilemel surjaniel ar galon, da skouer e-kerz un treuzplantadur.

cardinal

- *le signe cardinal d'une maladie* priñvarouez ur c'hleñved
- *les quatre veines cardinales de l'embryon* peder gwazhienn briñvek ar rizhell.

cardiobulbaire : syndrome ~ ◇ ◇ **azoniad kalonhirvelel** Kevreted un trec'hwezh Cheyne-Stokes hirvelien ha direizhoù korvez ar galon, o tarvezout e-kerz kleñved Friedreich ha marvus alies.

cardiocutané : syndromes ~s ◇ ◇ **azoniadoù kalonkroc'heneel** Teskad azoniadoù hêrezhel o c'hoarvezout a zireizhoù kalongwazhiedel ha kroc'heneel (kleñved Marfan, azionad LEOPARD, h.a.).

cardiocytes ◇ **cardiocytes** ◇ **kardiokit s.** Kelligoù ar c'haer kalon.

- cardiogénique** ◇ **cardiogenic** ◇ **kalonien** aa. E dianlen un anaez kalon (sl. *cardiaque*).
- cardiologie** ◇ **cardiology** ◇ **Kalonouriezh** b. Diskiblezh vezegel o plediñ gant ar galon hag ar gwazhied.
- cardiologue** ◇ **cardiologist** ◇ **kalonour** g. **-ion** Mezeg arbennikaet war gleñvedoù ar galon hag ar gwazhied.
- cardiomégalie** ◇ **cardiomegalia** ◇ **keurgalonegezh** b., **kalonusvent** b. Muiadur ec'honad ar galon, anaez familhel alies.
- cardiomyoplastie** ◇ **cardiomyoplasty** ◇ **kaheratelviñ kalon, kalonatelviñ** Dazluniañ surjanel kaher ar galon dre dreuz-plantañ darn ur gigenn eskernel (evel kigenn ledanañ ar c'hein) ouzh ar c'hofig kleiz en ur stigmañ un trevnad tredanfraouaet evit dec'h an argrezadoù a-gellusk gant re ar galon (sl. *aortomyoplastie*).
- cardionecteur** : **appareil** ou **système** ~ ◇ **cardionector system** ◇ **trevnad g. kalonaoter** Nervreizhiad spesadel ar galon, ganer ha reer ar broud o telankañ argrezadoù ar c'haer kalon, o c'hoarvezout a ziv elfenn : ar *benvegad kentezaoter*, anezhañ ar c'hloer god-kentez loet er c'hentez dehou, ar *benvegad kofigaoter*, ouzh e ober ar c'hloer kentez-kofig, loet war speur draoñ ar c'hentez dehou, hag an hordenn gentez-kofig (hordenn His) o tementañ ebarzh an dilhenn, rannet e daou varr o vont da bep a gofig.
- cardiopathie** ◇ **cardiopathy, heart disease** ◇ **anaez g. -ioù kalon, kalonanaez g., naoued g. -où kalon, kalon-naoued g.** Anvad genadel ar c'hlañvadurioù kalon.
- cardiopathie carcinoïde** ◇ **carcinoid heart disease** ◇ **kalonnaoued karkinoidel** Tizhad an enkalonenn er c'havennoù dehou peurliesañ gant un dassez diouzh karkinoid ar vouzellenn voan.
- cardiopathie congénitale** ◇ **congenital heart disease** ◇ **kalonnaoued ganedigel** Kammneuziad ar galon da heul un darniñ pe ur gwariañ eus an organbarañ (aneroubar pe mibar).
- cardiopathie ischémique** ◇ **isch(a)emic heart disease** ◇ **kalonnaoued heskwadel** Anvad genadel ar c'hlañvadurioù diwar leiñ pe astal an eroueriañ en ur parzh eus ar c'haer kalon, forzh pe wikefre e ve, peurliesañ avat diwar an ateroskleroz kurunerel.
- cardiopathie noire, syndrome des cardiaques noirs, syndrome d'Ayerza** ◇ **Ayerza's disease** ◇ **kalonnaoued du, azoniad ar galongleñvion du, azoniad Ayerza** Seurtad eus ar galon skeventien henek, naouus dre un dulaz teñval, un trec'hwezh muiek, skrouediadoù gwad, elruz, dedro herrek trema skorted andire ar c'hofig dehou.
- cardiopathie radique** ◇ **radiation induced heart disease, cardiac radiation injury** ◇ **kalonnaoued skinadien** Anaez kalon e dianlen skinguradoù ar bruskl, anezhañ un amgalonennfo henek gant tevadur stirek, dibaotoc'h plakennoù stirek en enkalonenn hag er c'haer kalon, grevusadur ur skorted kurunerel.
- cardiopathie rhumatismale, rhumatisme cardiaque, cardite rhumatismale** ◇ **rheumatism of the heart** ◇ **kalonnaoued remmel, remm g. ar galon, kalonfo g. remmel** Tizhadur ar galon da geñver ur remm lemm a 'n arzoù, naouus dre zireizhoù liesseurt : mire, tanienn an enkalonenn hag an amgalonenn (sl. *Bouillaud : maladie de* ~).
- cardiopathie valvulaire** ◇ **valvular heart disease** ◇ **kalonnaoued trapigell** Anvad genadel ar c'hlañvadurioù kalon oc'h erdalañ holl dizhadurioù an trapigoù, ha pa vent ganedigel pe arzeuat, ha pa ve diwarno skorted pe isvoll.
- cardioplastie** ◇ **cardioplasty** ◇ **kardiaatelviñ, gwaskatelviñ** Oberatadenn war lodenn draoñ an treizher ha gwask krec'h ar stomok evit parraat ouzh un andag pe un isvoll.
- cardioplégie** ◇ **cardioplegy** ◇ **kalonseizi g.** Astal ar galon en diastol, pe emdarzh pe dec'hant e-kerz un oberatadenn.
- cardiorraphie** ◇ **cardiorrhaphy** ◇ **kalondlita** Krafalañ ur gouli er galon.
- cardiorrhexie** ◇ **cardiorrhexis** ◇ **kalonedvidañ** Fregañ ur speur eus ar galon.
- cardioscope** ◇ **cardioscope** ◇ **kardioskop g.** Ardivink o kevaraezañ goulaouiñ hag enselliñ an diabarzh eus kavennoù ar galon.
- cardiosélectif** ◇ **cardioselective** ◇ **kalondiuzel** aa. A-zivout un danvezenn wezhus ouzh ar galon hepken, sk. : *betadole her kalondiuzel*, o werediñ war ar buzerioù b1 hepken (sl. *bêtabloquant*).
- cardiospasm, phrénospasme, phrénocardiospasm, rétrécissement essentiel cardio-œsophagien, méga-œsophage fonctionnel** ou **idiopathique** ◇ **cardiospasm, achalasia** ◇ **kardiaandag g., gwaskandag g., treizherusvoll g. arc'hwelel pe hennadek, kardiaangad g., gwaskangad g.** Miarc'hwel kelc'hstrishaer traoñ an treizher : ustant er paouez hag angad da geñver al lonkañ, o tevoudañ gant an amzer ar brelonk hag usvoll an treizher ; ar strafuilh orin ned eo ket an andag, met ezvezañ an erwez erluskañ reol e-ser al lonkañ e daoufarzh traoñ an treizher (sl. *achalasia*).
- cardiotachymètre** ◇ **cardiotachymeter** ◇ **teadventer g. -ioù (kalon), kardiatakimetr g. -où** Ardivink da vuzuliañ talm argrezadoù ar galon.
- cardiothoracique** : **index** ou **rapport** ~ ◇ **cardiothoracic ratio** ◇ **keñver g. kalon-brusk** Keñver etre treuzkizoù ar galon hag ar bruskl muzuliet war ar pellskinlunad a-dal ; ent reol e vez dindan 0,55 gant ar vagadell, dindan 0,50 gant an oadour.
- cardiothyroïse** ◇ **cardiothyreotoxicosis** ◇ **kalon skoedennien** Anvad genadel an direizhoù kalon e dianlen miarc'hwel ar skoedenn : kalon vazdovel diwar ar skoedusvorc'h, kalon viksedematus diwar ar skoedisvorc'h ; peurliesañ ez arverer an termen da verkañ ar skoedusvorc'hegezh.
- cardiotocographie** ◇ **cardiotocography** ◇ **kalonkrozhezañ** Tredanwezañ kendalc'hek diaser kalon ar grouell hag argrezadoù ar grozh edoug ar gwilioudiñ, e sell da ziournat arouezioù gouzañvder ar grouell.
- 1 2 cardiologie 2 cardiologie** ◇ **cardiotomy** ◇ **1 kalonenbenañ 2 kardiaenbenañ** 1 Skejañ surjanel ar galon. 2 Flañchañ gwask krec'h ar stomok.

cardiotonique, tonicardiaque ◇ **cardiotoxic** ◇ **1 kalonusreüs aa., kalonusreer aa. 2 kalonusreer g. -ioù** 1 O vuiaat tant ar c'haer kalon. 2 Lia kalonusreüs, evel douhennadoù ar brulu (*digitoksin, digoksin*), an *adrenalin*, an *dopamin*, h.a.

cardiotoxique ◇ **cardiotoxic** ◇ **kalonbistriek aa.** Argevezus ouzh ar galon.

cardiovalvulotome ◇ **cardiovalvulotome** ◇ **trapigenbener g. -ioù, kardiovalvulotom g. -où** Benveg surjaniel araezus da zienkaat isvoll trapigoù ar galon dre flañchañ kemped ar freilhoù etre-sac'helloù.

cardiovasculaire ◇ **cardiovascular** ◇ **kalongwazhiedel aa.** A-zave d'ar galon ha d'ar gwazhied.

cardioversion, défibrillation ◇ **cardioversion** ◇ **kalonassav, digrehadiñ** Adsavelañ ar gorvez kalon reel diwar-bouez an tredangridañ; embreg arveret evel ober paouez d'ar gwiennghedoù kalon (sl. *fibrillation*); an ardivink arveret eo an *digrehader* (pe *kalonassaver, kardioverter*, Gl. *déibrillateur* pe *cardiovertetur*).

cardite ◇ **carditis** ◇ **kalonfo g.** Anvad dispredet tanijenn speurioù ar galon, dreist holl tizhadoù ar remm lemm (sl. *Bouillaud*: *maladie de —, endocardite, myocardite, péricardite*).

card-

- *altérations cardiovasculaires* disleberadoù kalongwazhiedel
- *boucle cardiaque* gwedenn galonel, gwedenn gofigel
- *cardioli-pine* kardioli-pin
- *cardiopathie cyanogène* kalonnaoued dulaseiat
- *cardiomyopathie obstructive* kalon-gaherad stevius
- *cardioprotes* kalonwezherioù
- *choc cardiogénique* bleuz kalonien
- *cirrhose cardiaque, foie cardiaque* kirroz kalonien, avu kalonien
- *complications cardiovasculaires* rouestladoù kalongwazhiedel
- *défaillance cardiaque* falladur kalon
- *effets cardiovasculaires* gweredoù kalongwazhiedel
- *électrocardiographie* kalonvarrezañ, kalonvarwezad
- *enfants atteints de cardiopathies* bugale kalonnaouedek
- *investigations électrocardiographiques* imbourc'hioù kalonvarwezad
- *myocardite* kalongaherfo
- *symptômes cardiovasculaires* azonoù kalongwazhiedel
- *tissu cardionecteur, tissu nodal* gwiad kalonaoter, gwiad klomel
- *tube cardiaque (primitif)* kanol arc'hkalon.

carence ◇ **deficiency** ◇ **negez g. -ioù** Ezvezañs pe skorted er bevedeg eus un pe lies danvezenn diziouerus d'ar c'hennevid; kemm a lakaer etre an *negeziou enankañ* (negez bouedel, negez heol) hag an *negeziou danveziñ* (negez koazhadel, negez mez-hurel), ivez etre an *negeziou bloc'hel* (isvag pe anvag) hag an *negeziou hanbarek* (negez vitaminoù, negez halioù meinell, negez amindrenkennoù, h.a.).

carence affective ◇ **bereavement** ◇ **negez kantaazel** Termen arveret gant bredoniourion 'zo da verkañ stadoù deskrevet gant re all evel dilerc'hegezh kantaazel, gouvid gouskorel, neuroz emzivated, o tizhout bugale o devez dioueret un darempred bastus ouzh o mamm (sl. *arriération affective, dépression anaclitique, névrose d'abandon*).

carence immunitaire, déficit immunitaire, immunodéfi-cience ◇ **immunodeficiency** ◇ **divig g. hangaeel, hangae-zivig g.** Skorted an araeziou difenn emdarzh ar bevedeg, pe an araeziou anspesadel (fagokitoz), pe an erwezhiou spesadel a hangae dourennel pe gelligel; diwar diouer ar genel antikorfoù e paota an antigenoù er bevedeg oc'h ober diwanañ hangaegemplezhiou noazus; e-touez ar c'heñvedoù diwar hangaezivig emañ an *haza* (sl. *complexe immun, immunité, sida*).

carenc/t-

- *alimentation par le riz décortiqué entraînant la carence en vitamine B1* emvevañ diwar riz divrennet o tec'han negez ar vitamin B1
- *carence calcique* negez kalkiom
- *carence en fer* negez houarn
- *carence partielle ou totale en hormone antidiurétique* divig darnel pe hollel en hormon enepthroasheiat
- *polynévrite carencielle* liesnervennfo negezel
- *vagabondage des adolescents suite à la carence familiale* kantreezh ar grennarded da heul diskoev ar familh.

carie ◇ **caries** ◇ **1 mallez g. (an eskern) 2 bruk g., brukañ (an dent)** 1 Askornfo henek torzhellek, naouus dre an amskaroù ha distruj argammedek ar gwiad askorn; ur seurtad anezhañ eo ar *mallez sec'h*, askornarzfo torzhellek, stadet er skoaz alies gwechall, o tedreiñ gorrek, dezhañ da anafoù deloezadur an askorn, skleroz hag isteñv ar stagelloù. 2 Kleñved garvevel anspesadel o tizhout gwiadoù kalet an dant, ouzh o distrujañ dre furmiñ enno kavennoù; dedreiñ a ra dre zereziou a ziforc'her evel henn : 1) ar brukoù antrebarzhus, anezho 1a) ar brukoù kentañ derez pe brukoù ar prigwer, 1b) ar brukoù eil derez, brukoù an dentin; 2) ar brukoù trebarzhus, anezho 2a) ar brukoù trede derez, naouus dre ar bouedenno, 2b) ar brukoù pevare derez, o c'hoarvezout a vreinged a 'r vouedenn.

carmin ◇ **carmine** ◇ **karmin g.** Livuzenn naturel tennet eus perez an tane ha danvezet er Wiadoniezh da naouaat ar glikogen (karmin Best) pe ar glaour (mukikarmin Mayer).

caroncule : grande ~ ◇ **greater duodenal papilla** ◇ **begenn b. vras an daouzegenn** Tosenn war dal diabarzh lodenn a-ziskenn an daouzegenn, enni difourk ar gloestr avu-ilgreiz.

caroncule : petite ~ ◇ **smaller duodenal papilla** ◇ **begenn vihan an daouzegenn** Tosenn vihan kernennek war speur diabarzh an daouzegenn a-ziskenn, enni difourk adsan an ilgreiz.

caroncule lacrymale ◇ **lacrimal caruncle** ◇ **tagos g. an daerou** Tosenn vihan ront e kogn diabarzh al lagad, e diabarzh ar pleg kornloarek, loet etre parzhioù daeraouel ar malvennoù.

caroncule myrtilforme, caroncule de l'hymen ◇ **caruncula hymenalis** ◇ **tagos al lienenn gourzh** Pep hini eus an torzhelloùigoù dizingal loet e digor ar gouin, anezho dilerc'hioù eus ar gwerc'hkenn (lienenn gourzh) goude ar gwilioud kentañ.

caroncule sublinguale ◇ **sublingual papilla** ◇ **tagos endan-deod** Balirad bihan loet en nant logigoù-teod e penn traoñ ar poell, a zo o tifourkañ en e veg sanig Wharton ha sanig Rivinus, anezho forzhioù degorzhañ ar wagrenn endan-deod.

carotène, carotine ◇ **carotene** ◇ **karoten** g. Rumm livegennoù orañjez enaozet gant struzhennoù 'zo (karotez, orañjez, kourjetez, h.a.), bezant ivez en aozadoù loenel (amann, melen vi); treuzfurmet e vez ar β -karoten e vitamin A e-barzh bouzellenn voan an darn vuiañ eus al loened (nemet an den); kengrafet gant proteinoù ez a d'ober ar c'harotenoproteinoù, en o zouez moug al luc'hsae.

caroténémie, carotiniémie ◇ **caroten(a)emia** ◇ **gwadvec'h** g. **karoten, karotenwadvec'h** g. Feur al livegennoù karotenoidel er gwad (ent reol etre 1 ha 2 mg/l).

caroténodermie, carotinodermie ◇ **carotinoid pigmentation, pseudojaundice** ◇ **kroc'hengarotenegezh** b., **gaoujanuz** g. Reñver livegennoù karotenoidel (*karotenuswadvec'h*) o tec'han ul livegad melen ezreol er c'hroc'hen, hewel war ar solioù dreist holl.

carot-

• *caroténoïde* karotenoid, karotenoidel • *hypercaroté/inémie* gwadusvec'h karoten, karotenwadusvec'h • *prélever une carotte de tissu*s erlemel ur rolled gwiadou.

carotide : artère ~ ◇ **carotid artery** ◇ **talmerenn** b. **garotidel, karotidenn** b. Talmerenn ar gouzoug hag ar penn.

carotide : artère ~ **commune, artère carotide primitive** ◇ **common carotid artery** ◇ **talmerenn garotidel voutin, karotidenn voutin** Pep hini eus an div dalmerenn o tont, a-zehou eus ar c'hef brec'h-penn, agleiz eus gwareg an aortenn war eeun, hag o kavaziñ etre karotidenn diabarzh, talmerenn an empenn, ha karotidenn diavaez, talmerenn an dremm.

carotidogramme ◇ **carotidogram** ◇ **tresenn** b. **garotidel, karotidresenn** b. Kevregad diwar lerc'hwezañ, a-dreuz d'an amwiskadoù, poulzadennoù an dalmerenn garotidel pe argemmadou ar gwask enni.

carotidyne ◇ **carotidynia** ◇ **karotidost** b. Laur e kostez ar gouzoug diwar un anaf er garotidenn, diwar an enrec'h anezhi pergen.

caroti-

• *carotide externe* talmerenn garotidel diavaez, karotidenn diavaez • *carotide interne* talmerenn garotidel diabarzh, karotidenn diabarzh • *carotidien* karotidel • *dissection de la carotide* enrec'h ar garotidenn.

carpe ◇ **carpus** ◇ **eskern** l. (u. : **askorn** g.) **an arzorn, karp** g. Tolzennad eskern oc'h ober atel an arzorn, anezhi eizh askorn bihan e div renkennad; *renkennad nezek* : skafeg, loareg, trizueg, pizenneg; *renkennad pellek* : tristrurie, eiltristrurie, pennog ha bac'heg.

carpectomie ◇ **carpectomy** ◇ **arzonezvenañ** Dazbidañ unan pe lies askorn a 'n arzorn.

carphologie, crocidisme ◇ **carphology, floccilation, crocidismus, tilmus** ◇ **toupennata** Jestrevez teuta hag ardapout dizehan gant an daouarn hag ar bizied a-berzh klañvourion arluzek (en tufoz, en alfo kren, h.a.).

carpite ◇ **carpitis** ◇ **arzoñfo** g. Tanienn eskern an arzorn.

carpocypose, carpus curvus, maladie de Madelung, subluxation spontanée de la main ◇ **Madelung's disease** ◇ **rakwar** g. **an arzorn, kleñved Madelung, gouzisevell emdarzh an dorn** Kammneuziad hêrezhel treuzkaset ent aotozomek trec'hek, anezhi regresk parzh adreñv penn traoñ ar werzhid o tevoudañ rakplegad an arzorn ken e hañval heñval bezañ disvellet.

carrefour hypothalamique : syndrome du ~, syndrome cérébello-thalamique ◇ **cerebellothalamic syndrome** ◇ **azoniad ilpenn-derc'hvel** Azoniad troadempenel diwar un anaf lec'hiet e tachad ar gronn ru, anezhañ direzhoù ilpennel a-eiltu, ul ledangwel diavann unsko, ul ledseizi leiek ha strafuilhoù santadel e par an eraeziñ endonel.

carrefour pétrosphénoïdal : syndrome du ~, syndrome de Jacod ◇ **Jacod's syndrome** ◇ **azoniad karregenn-genneg, aziadiad Jacod** Azoniad diwar amwask an II^l, III^e, IV^e, V^t, VI^t nervenn a-glopenn gant ur sarkom eus ar gorzenn glevedel pe gant ur yoc'henn eus ar c'hougofenn pe eus ar pod lagad.

carte chromosomique, carte factorielle ◇ **gene mapping** ◇ **kartenn** b. **ar gen, deloñ (ar gen)** Savelañ loadoù ar gen war ar c'hromozomou (sl. *génomme, génomique*).

Carter et Robin : test de ~, épreuve de ~, épreuve de Hickey-Hare ◇ **infusion of hypertonic saline solution** ◇ **prouad** g. **Carter ha Robin** Prouad arveret evit imboure'hiñ borc'hadur an hormon drekgougofenn (hormon enepetroasheiat, vazopresin, ADH) ha deznaouiñ an diabet heuz, anezhañ muiat osmoleriezh ar gwad diwar-bouez trefennañ un dileizhenn usgrennek kloridenn natriom; gant an den bonan e stader ul leïad a etre 70 ha 90 % eus an troazhidi hag ur muiad eus douester an troazh; pa vez diabet heuz ne leia ket an troazhidi hag izel e van izel douester an troazh (sl. *antidiurétique : hormone* ~).

cartilage ◇ **cartilage** ◇ **migorn** g. (l. -où, **migern**) Seurtad gwiad kenglenel a zo e gelligoù hag e wiennoù paket e-barzh ur vondanvezenn sonnel, angwazhied : ar bleuskenn.

cartilage articulaire ◇ **articular cartilage** ◇ **migorn kenvell** Gwervigorn levn ha luf o wiskañ an talbennoù kenvellañ, e devder a-geñver gant ar gwask o ren war ar c'henvell.

cartilage aryénoïde ◇ **arytenoid cartilage** ◇ **migorn picherek, pichereg** g. Pezh migornek eus ar c'harloc'henn loet a-us da lavnenn al lagadenn, stag outañ penn adreñv plegoù ar vouezh.

cartilage costal ◇ **costal cartilage** ◇ **migorn ar gostezenn** Pep hini eus ar migern en astenn da benn araok ar c'hostoù, ar seizh uhelañ anezho stag war eeun ouzh ar glerenn, an tri da heul stag dre hanterezh ur c'henvigorn, an daou izelañ o venel distag.

cartilage cricoïde ◇ **cricoid cartilage** ◇ **lagadenn (vigorn)** Gwalenn vigorn oc'h amparañ rann izelañ atel ar c'harloc'henn, ouzh he ober ul lodenn diaraok, moan, ar wareg lagadenn, hag ul lodenn diadreñv, al lavnenn lagadenn.

cartilage de conjugaison, cartilage conjugal, cartilage de croissance, cartilage diaphyso-épiphyseaire, plaque cartilagineuse ◇ **epiphyseal cartilage, epiphysial disk, epiphysial plate, epiphyseal synchondrosis** ◇ **migorn an dalpenn, migorn kevreañ, migorn kreskiñ, disk g. talpenn** Tachad bevret etre talpenn ha treuzenn en eskern ar bugel ma c'hoarvez ar c'hresk anezho diouzh an hed, dezhañ er skinwerañ neuz ur vandenn voan voull; *talpenn strujek* (Gl. *épiphyse fertile*) a reer eus an hini a zo stag outi ar migorn kreskiñ niñvekañ.

cartilage élastique ◇ **elastic cartilage** ◇ **migorn dastennek** Seurtad migorn a zo e weüsted a-geñver gant paoted ar gwiennou dastennek e-barzh e bleuskenn; bezant en ode diavaez ar c'hleved, er gorzenn glevedel, en ankoue hag e pezhioù 'zo eus ar c'harloc'henn.

cartilage en Y ◇ **Y cartilage** ◇ **migorn Y** Tachad skinvoull stadet er bugel etre an askell glun hag an eskern koazez ha kaezour, skeudenn eus migorn kreskiñ askorn al lez.

cartilage fibreux, fibrocartilage ◇ **fibrocartilage** ◇ **migorn stirek, stirvigorn g.** Seurtad migorn a zo e reuter hag e wenvned a-geñver gant paoted an hordennoù kollagen; bezant en diskoù etre-melloù, er juntad a-gaezour, en enlenad stirenn ar seul hag e kreskennoù ar glin.

cartilage hyalin ◇ **hyaline cartilage** ◇ **migorn gwerek, gwervigorn g.** Seurtad migorn, treuzluc'h dre berzh dibaoted ar gwiennou kollagen en e bleuskenn; bezant e lies lec'h : er c'henvelloù, er c'hostoù, er fri, er c'harloc'henn, er vriant hag er bronkez.

cartilage thyroïde ◇ **thyroid cartilage** ◇ **migorn skoed** Migorn eus ar c'harloc'henn loet a-us da wareg al lagadenn, anezhañ div lavnenn gostezel ledan o stummañ balir ar c'harloc'henn dre o c'henstagadur war al linenn greizer.

cartilag-

- *cartilage commun* kenvigorn
- *la cloison nasale dans sa partie cartilagineuse* tilhenn ar fri en he lodenn vigornek
- *tissu cartilagineux* gwriad migorn, gwriad migornel.

cartographie ◇ **mapping** ◇ **glennañ** Lerc'hwezañ e rezh ur c'hevregad un anadenn vevdedel evel gweredezh tredanel ar galon, pe e rezh ur skeudenn ar skinoù ec'hodet gant ur parzh korf e disoc'h an imboure'h dre ar skingannluniñ izotopek (sl. *scintigraphie*).

carus, coma carus, coma aréactif, coma stade III ◇ **complete coma** ◇ **peurgoma g., koma g. anerwezh, koma pazenn III** Koma don gant distresadur an arc'hwelioù nervstruzhel, naouus dre steuz an damougou, an ezvezañs eus pep erwezh ouzh ar fraouadoù skiantennel, strafuilhoù muiek en analañ hag en amred ar gwad.

caryocinèse, karyokinèse ◇ **karyokinesis** ◇ **kariokinez g.** Hollad an anadennoù dialuskel o c'hoarvezout da geñver emrannadur ar graoñell hag o tisoc'h gant furnidigezh div graoñell verc'h; er bevedegoù uhelañ e vez dasparzhet a-gevatal an dafar hilel etre an div graoñell verc'h dre wikefre ar mitoz.

caryoclasique ◇ **karyoklastic** ◇ **karioklastek aa.** A-zivout un danvezenn en araez da anafañ kraoñell ar gellig ha da skoilhañ ar mitoz.

caryolyse ◇ **karyolysis** ◇ **karioliz g.** Unan eus tri mod displeberñ ar graoñell, naouus dre steuzidigezh argammedek ar goc'henn hag al luniadoù all anezhi, an daou vod all o vezañ ar c'harioreskis hag ar piknoz.

caryorrhesis, caryorrhexie, caryorexie ◇ **karyorrhesis** ◇ **karioreskis g.** Mod displeberñ ar graoñell da geñver marvennadur ar gellig, naouus dre vloksidigezh ar graoñell ha strewidigezh an drailhenoù anezhi dre ar c'hitoplasm.

caryotype ◇ **karyotype** ◇ **genrizh g., kariotip g.** Teskad ar c'hromozomou bezant en ur gellig, naouus d'un hinienn pe d'ur spesad; genrizh mab den a zeskriver hervez destladur etrevroadel Denver (1960); renkañ a reer ar c'hromozomou dre urzh o hed war zigresk ha diouzh savlec'h o c'hentromer; dasparzhet emañ ar 46 kromozom denel :

- e-barzh kelligoù ar *soma*, eleze kelligoù ar c'horf e-maez ar c'helligoù revel : diouzh un tu, 44 A (kromozomou somatek pe *aotozomou*, erifvet dre an *delun aotozomek*, Gl. *formule autosomique*), diouzh an tu all, 2 X gant ar vaouez, X + Y gant ar gour (kromozomou revel pe *gonozomou*, erifvet dre an *delun gonozomek*, Gl. *formule gonosomique*);

- e-barzh kelligoù ar *germen*, eleze ar c'helligoù revel : 22 A + X evit ar vigellig, 22 A + X pe 22 A + Y evit ar spergellig (kromozomou revel pe *gonozomou*, erifvet dre an *delun gonozomek*);

sammad an delunioù aotozomek ha gonozomek eo an *delun kromozomek*, amparet gant niver ar c'hromozomou hag an dasparzh anezho;

erfin, e teskriver e pep kromozom, adalek ar c'hentromer, ur *vrec'h verr* (p) hag ur *vrec'h hir* (q) ha, war bep brec'h, *bannou* bodet e *parzhioù*; e se, al *loadoù kromozomek* a spisllec'hier hervez an destladur resis, da skouer, 11 p 1-3 a intenter evel henn : "trede bann eus kentañ parzh brec'h verr ar c'hromozom 11" (sl. *centromère, chromosome*).

case : **ver de** ~ ◇ **Congo floor maggot** ◇ **leurgontron s. Kongo, kontron s. foukenn** Miiaz argroc'hennel diwar larv anpav ha gwadezat *Auchmeromyia luteola*.

1 3 caséiforme 1 2 3 4 caséux ◇ **caseous** ◇ **1 keuzheñvel aa. 2 keuzek aa. 3 keuzennek aa. 4 keuzennel aa.** 1 Gant neuz ar c'heuz. 2 A natur gant ar c'heuz. 3 A natur gant ar geuzenn. 4 A-zave d'ar geuzenn.

caséification, dégénérescence caséuse ◇ **caseification** ◇ **keuzennañ, keuzennadur g., dic'henezhañ keuzennel** Rizh marvennañ o tizhout kreiz ar bolc'hennou torzhellek hag o tisoc'h gant furniñ keuzenn.

caséine ◇ **casein** ◇ **kazein** g. Fosfoprotein oc'h ober ar rann vrasañ eus danvezioù nitrogenek laezh ar bronneged, darbennet evel protein dave, danvezet kalz er Vouedouriezh.

caséum ◇ **caseum** ◇ **kezenn** b. Danvezenn arwenn pe arvelenn, lies neuz dezhi (toazek, greunigaouek, kaotek), e disoc'h ar marvennañ, a vez oc'h ober lodenn greiz anafoù an dorzhellegezh.

cassavisme ◇ **cassava intoxication** ◇ **kasavegezh** b. Pistriadur gant ar maniok c'hwerv; er furm lemm e c'hoarvez a strafuilhoù koazhadel, a vleuz marvus a-wechoù; er furm henek e stader direizhoù nerval : nervadoù trobarzhel, melfoioù, tizhadur an nervenn weled.

cassette ◇ **cassette** ◇ **kased** g. Golo reut oc'h enderc'hel ur film skinluniñ, boull d'ar skinoù X, demer ouzh al luc'h, ennañ alies skrammoù dargemmaat.

cassette

• *on allonge le patient le menton en contact avec la cassette* ar gouziviad a lakaer a-c'hourvez, a-stok e elgezh ouzh ar c'hased.

castrat ◇ **castrate** ◇ **spazh** g. -eion, **spazhed** g. -idi, **tizog** g. -ed Gouziviad ar spazhañ.

castration ◇ **castration** ◇ **spazhañ**, **spazhadur** g. Lemel pe distrujañ organoù ar genel dre ar surjinaerezh, ar gimiezh, ar skinata, h.a.; hervez ar revelezh, e komzer eus *kellezvenañ*, *vierezezvenañ*, *divgellezvenañ*, *divvierezezvenañ*, *unkellezvenañ*, *unvierezezvenañ* (pe, evit an div rev, *ledspazhañ*, Gl. *castration incomplète*); er Vezekniezh lezennel e respizer ar spazhañ evel ambañ ouzh un den all un organ ret d'an engehentiñ (sl. *orchidectomie, ovariectomie, stérilisation*).

castration : **angoisse de** ~ ◇ **castration anxiety** ◇ **enkreuz** g. **ar spazhadur** Keal bredelfennadel : goude dizoleiñ ar c'hemm etre an div rev, e sav er paotr bihan an amgren da goll e galc'h, er plac'h vihan ar mantr da vezañ e gollet.

castration : **complexe de** ~ ◇ **castration complex** ◇ **kemplezh** b. **ar spazhadur** Er Bredelfennerezh, kemplezh kreizet war eriuennel ar spazhadur; gant bredelfennerion 'zo eo bet astennet keal ar spazhañ betek ober anezhañ un heñvelster d'an dioueriñ; e se e ra aozerion 'zo gant geriennoù evel *spazhadur genaouel* (Gl. *castration orale*).

catabolisme ◇ **catabolism** ◇ **eznevid** g., **nevid** g. **diskar**, **disvevelaat** Hollad an dazgweredoù ec'haozañ bevgediadoù ar bevedeg, dilaosket ganto gremm ha dilerc'hiadoù (pe *disveveladoù*); ezvevennet e vez an disveveladoù e rezh troazh, mon, c'hwec'gant al Loened; gant ar Plant hag amprevaned 'zo e vezont kadavet e-barzh organoù dastum (sl. *anabolisme, métabolisme*).

catabolite ◇ **catabolite** ◇ **eznevid** g. Danvezenn e disoc'h treuzfurmadur un diaraoger e-kerz an eznevid.

catabol-

• *le catabolisme de l'hémoglobine en bilirubine* ezneviderezh an hemoglobine e bilirubin • *les 17-cétostéroïdes sont des catabolites des hormones androgènes et glucocorticoïdes* ar 17-ketokortikoid zo eznevidadoù diwar an hormonoù androgen ha glukokortikoidel • *situation catabolique* savied eznevidek.

catacrote : **incisure** ~ ◇ **dicrotic notch** ◇ **ask** g. **katakrotek**, **ask dikrotek** Ask war linenn diskenn ar garotidresenn, erzerc'h da serridigezh sac'helloù kornloarek an aortenn.

catagène : **stade** ~, **phase** ~ ◇ ◇ **lankad** g. **katagen** Pazenn eus ar blevgor ma paouez kresk ar blev (sl. *cycle pileaire, trichogramme*).

catàire : **frémissement** ~ ◇ **purring**, **purring thrill**, **presystolic thrill** ◇ **gougrid** g. **rouzmouzus**, **rouzmouz** g. Anvad roet gant Laennec d'an daskren munut hag herrek heñvel ouzh rouzmouzerzh ur c'hazh, merzhet gant palv an dorn harpet plaen war ranbarzh kern ar galon, kevret gant ur sourr fraoñvus ouzh ar selaoennañ, erzerc'had an isvoll mintrek; astennet eo bet arver an termen d'an daskrenoù heñvel oc'h azonañ an isvoll eus gwaskoù all ar galon (sl. *frémissement*).

catalase ◇ **catalase** ◇ **katalaz** g. Enzim oksider en araez da zigediañ ar beroksidenn hidrogen (H₂O₂) en ur zilaoskiñ oksigen.

catalepsie ◇ **catalepsy** ◇ **darsonn** g. Koll padennek argrezusted diavenn ar c'higennoù gant ustant ha hezvel kaherel; pa zeu an arseller a-benn da drec'hiñ d'an ustant ha da zeloc'hañ an izili e van ar re-mañ en emstummoù roet dezho (anadenn ar *weüsted koarek*, *flexibilitas cerea* an aozerion glasel); ha pa ve deloc'hadus pe get an izili hervez derez an ustant, e vez ar gouziviad dic'houest da nep fiñval emdarzh; lodek eo an darsonn en anaizioù diseurt : anafoù empenn, azoniadoù parkinsonek ha dianempennfoel, skizofreniezh, darfell, teogerezh.

cataleptiforme ◇ **cataleptiform** ◇ **darsonnvanek** aa. Gant neuzioù 'zo eus an darsonn.

cataleptique ◇ **cataleptic** ◇ **1 darsonnek** aa. **2 darsonneg** g. -eion **3 darsonnel** aa. 1 Gant an darsonn. 2 Gouziviad an darsonn. 3 A-zave d'an darsonn.

catalyse ◇ **catalysis** ◇ **treluskañ** Herrekaat buanez un dazgwered kimiek dre ouzhpennañ ur c'hementad munut eus un danvezenn anvet *trelusker*; pa vez dileizhet an trelusker er metoù liñvel ma c'hoarvez an dazgwered, e komzer a *dreluskañ unvan* (Gl. *catalyse homogène*); a *dreluskañ dizunvan* (Gl. *catalyse hétérogène*) pa ampar an trelusker un arvez diforc'h diouzh metoù an dazgwered.

catalys/t-

• *catalyser la dégradation de l'amidon en maltose* treluskañ dispenn an ampez e maltoz • *ligase catalysant la condensation d'une molécule de CO₂ et d'un acide cétonique* ligaz o treluskañ kendouesadur ur volekulenn CO₂ hag un drenkenn getonek • *pot catalytique* pod treluskañ • *propriétés catalytiques* perzhioù treluskañ, perzhioù treluskañ • *une substance dite catalyseur* un danvezenn anvet trelusker.

cataménial ◇ **catamenial** ◇ **miziaouel** aa., **mizliñvel** aa. A-zave d'ar mizioù.

catamnèse ◇ **catamnesis** ◇ **diarlerc'hiou** l. (g.) Stlennadoù dastumet a-zivout ur gouziviad goude e glañvdiadur war-benn studiañ dedro e gleñved (sl. *anamnèse*).

cataphasie ◇ **cataphasia** ◇ **daradc'heriañ** Strafuilh ar gomz, anezhañ liesarren an hevelep respont d'un aters.

cataplexie ◇ **cataplexy** ◇ **darsouz** g. Steuz trumm an tant diaboz oc'h ober d'ar gouziviad kouezhañ hep koll anaoudegezh; bez' e c'hell bezañ hollek ha diraez an holl gigennoù rizennek, pe darnek hag eztandañ an izili traoñ, an izili krec'h pe ar chagell; kevredet gant an hunfell ez a an darsouz d'ober azoniad Gélineau.

cataracte ◇ **cataract** ◇ **ferennlug g.**, **banne** g. Demerâd ganedigel pe arzeuat (emdarzh pe daraezel) eus ar ferenn; c'hoarvezout a ra eus dic'henezhadur ha koll boullded gwiennou ar ferenn diwar daskemmadoù kennevidel; alies e chom dianav arbenn ar ferennlug.

cataracte congénitale ◇ **congenital cataract** ◇ **ferennlug ganedigel** Demerâd ar ferenn o revout d'ar c'hanedigezh pe o tarvezout nebeut goude, dezhañ lies furm lec'hiadurel : *ferennlug a-vlein, a-graoñell, a-gelc'henn*.

cataracte corticale ◇ **cortical cataract** ◇ **ferennlug a-gaenenn** Furm lec'hiadurel eus ferennlug ar gozhiadel ma vez kantet an demerâd, ac'hoel en deroù, e gwiskadoù ar gaenenn, hep diraez kraoñell ar ferenn.

cataracte endocrinienne ◇ **endocrine cataract** ◇ **ferennlug enborc'hadel** Ferennlug o reuziañ dreist holl an dud yaouank, naouus dre zemeradur ur gwelead eus ar ferenn dindan ar pourc'had adreñv (*ferennlug endan-bourc'hadel*), e dianlen un direizh dibarek eus ar c'hennevid (diabet, tetaniezh).

cataracte génétique, **cataracte familiale** ◇ **hereditary cataract**, **familial cataract** ◇ **ferennlug hilel**, **ferennlug hêrezhel**, **ferennlug familhel** Furm ferennlug ma vez treuzkaset ar c'hleñved er mod trec'hek pe enkilek.

cataracte nucléaire ◇ **nuclear cataract** ◇ **ferennlug a-graoñell** Furm eus ar ferennlug kozhiadel ma tedro gorrek an demerâd goude deraouiñ e kraoñell ar ferenn.

cataracte pathologique ◇ **complicated cataract** ◇ **ferennlug diangleñved**, **ferennlug rouestladek** Ferennlug e dianlen ur c'hleñved lagad, peurliesañ ur gwazhiedsaefo henek pe adfeilhus.

cataracte polaire antérieure/postérieure ◇ **anterior/posterior polar cataract** ◇ **ferennlug a-vlein araok/adreñv** Furm ferennlug ma chom an demerâd kantet en un tachad bihan eus blein araok pe eus blein adreñv ar ferenn.

cataracte pyramidale ◇ **pyramidal cataract** ◇ **ferennlug pikernennek** Demerâd bihan hevonn, andedroüs peurliesañ, o valirañ diwar vlein araok ar ferenn.

cataracte rubéolique ◇ **embryopathic cataract**, **materna rubella cataract** ◇ **ferennlug dianruzig**, **ferennlug rizhell-naouedel** Ferennlug e dianlen ur rizhellnaoued diwar ruzig ar vamm.

cataracte secondaire ◇ **after-cataract**, **secondary cataract** ◇ **ferennlug eilvedel**, **azferennlug g.** Dilerc'hiadoù demerâd (gwiennou ha pourc'had) goude oberata pa n'eo ket bet klok ezvenadur ar ferenn.

cataracte syndermatique, **cataracte atopique** ◇ **syndermatotic cataract** ◇ **ferennlug sergroc'henad**, **ferennlug atopek** Ferennlug o c'hoarvezout war un dro gant anaezioù kroc'hen 'zo evl an ekzema pe ar skleroderma.

cataracte totale ◇ **total cataract** ◇ **ferennlug hollel** Pazenn dibenn ar ferennlug pa vez an demerâd oc'h aloubiñ holl weleadoù ar ferenn.

cataracte toxique ◇ **toxic cataract** ◇ **ferennlug pistriell** Furm ferennlug diwar ur pistriadur kimiek, gant al liaoù da skouer (dinitrofenol, kortikoidoù).

cataracte traumatique ◇ **traumatic cataract** ◇ **ferennlug daraezel**, **ferennlug diandaraez** Demerâd ar ferenn hevonn pe get o tarvezout da heul un daraez a 'l lagad, kreud eun pe gouli ebarzh.

cataracte des verriers, **cataracte du feu** ◇ **glass-workers' cataract** ◇ **ferennlug ar wererion**, **ferennlug an tan** Ferennlug diwar wered ar skinou danruz, o teraouiñ er blein adreñv, o trediñ gorrek, gant ar vicherourion a labour en ardizh an tan (gwererion, teuzerion).

cataracte zonulaire ◇ **zonular cataract** ◇ **ferennlug a-gelc'henn** Furm ferennlug ganedigel ma chom kantet an demerâd e gweleadoù 'zo eus ferenn ar rizhell en ur hepkoriñ ar graoñell greiz hag an trobarzh.

catarrhe ◇ **catarrh** ◇ **maeloù** g. Anvad roet gant an henozerion d'an holl danijennoù lemm pe henek eus ar glaougennoù gant glaourusvorc'h; nevesoc'h edo dalc'het an termen evit tanijennoù ar fric'hargadenn.

catathymie ◇ **catathymia** ◇ **darnoa** g. Strafuilh grezvarrek an noa.

catatonie ◇ **catatonía** ◇ **katatoniezh** b. Azoniad bredloc'hadel o kevrediñ koll a 'r c'hentodiñ er fiñvoù, ustant pe darsouz, meidoù orbidek, bloc'heiladek, darluskek, emzalc'hiou nac'hadek, malouen, dislen er realañ hag el lavar, koll a 'n hambout; hervez an azoerion e vez lakaet d'ar gatatoniezh arbennoù foel, pistriell, nerval; peurliesañ avat e reer anezhi ur furm a skizofreniezh.

catécholamines ◇ **catecholamines** ◇ **katekolamineier** l. (u. : **katekolamin** g.) Anvad genadel an aminoù uswaskieat simpatomimetek (*adrenalin*, *noradrenalin*), o diaraogerioù (*dopamin*) hag an deveradoù diwarno, hag int gwezhus pe get (*metanefrineier*, h.a.); danzeet e vezont e-barzh ar vezonuslouezhenn hag an elfennoù all eus ar reizhiad kromlen (sl. *adrénaline*, *dopamine*).

catécholergique ◇ ◇ **1 katekolwerc'her** aa. **2 katekol-werc'her** g. 1 A-zave da zilaosk pe da wered ar c'hatekolamineier. 2 Danvezenn gatekolwerc'her.

catégorie majeure de diagnostic (CMD) ◇ ◇ **rumm muiek an deznaouiñ** Termen eus mererezh an ospitalioù, pep rumm oc'h erdalañ holl anaezioù ur reizhiad arc'hwelel, da skouer *anaezioù an nerveg*.

(-)catén-

• *-caténaire* : qui se rapporte à une chaîne de ganglions lymphatiques ou de ganglions nerveux, ou d'une chaîne moléculaire -hedadel, -kefel, -digorvell : a-zave d'un hedad gwerblennoù pe d'ur c'hef kangrennoù pe d'un digorvell molekulel • *hormone polypeptidique monocaténaire* hormon polipeptidek undigorvell.

catgut ◇ **catgut** ◇ **katgut** g. Dafar krafaelañ arveret er Surjianerezh, o c'hoarvezout a zanvezennoù bevel a vez dre se deloezet da c'houde war al lec'h gant ar makrofag; warnañ e chom an anvad en doa pa veze prientet diwar vouzelloù kizhier; hiziv e tanvezer bouzelloù deñved d'e oberiañ.

catharsis ◇ **catharsis** ◇ **katarsiz** g. Disoc'h ur bredkurañ, anezhañ diskargadur azas ar c'hantaezadoù kleñvedus.

cathartique ◇ **cathartic** ◇ **1 skarzhus** aa. **2 skarzhuzeñ** b. 1 O tevoudañ usvorc'h gwagrennoù ar pervez hag o kentraouiñ an amdonnegezh dre hegañ ar glaourgenñ. 2 Lia skarzhus; ar skarzhuzeñnoù zo etreat o gwered da hini al laoskuzennoù ha hini an dergasuzennoù (sl. *drastique, laxatif*).

cathartique : **méthode** ~ ◇ **cathartic method** ◇ **hentenn** b. **gatartek** Hentenn vredkurañ o kemer da bal ar c'hatarsiz.

cathéter ◇ **catheter** ◇ **kateter** g. -ioù Gwechall, korzenn vezegel a ebarzhed er c'han troazh hag er c'hwezhegell; hiziv, pep korzenn voan ha gweüs a sanker en ur ganol d'he erc'hwiliañ, d'he c'harzhañ pe da ensinklañ enni un aozad (sl. *bougie, sonde*).

cathéter flottant, cathéter flotté, sonde de Swan-Ganz ◇ **Swan-Ganz catheter** ◇ **kateter tonnet, kateter Swan-Ganz** Sont moan ha bouk ebarzhet dre ur wazhienn drobarzh ha kaset dre red ar gwad betek ar c'hentez dehou ha kef ar skevent, o kevaraezañ an imbourc'h ouzh ar gwele hep skinreoliñ.

cathétérisme ◇ **catheterization** ◇ **kateteriñ** 1 Sankañ ur sont pe ur stilh en ur ganol, un organ kleuz (treizher, korzenn glevedel, kan troazh, kalon, h.a.), pe en ur fic'h. 2 Ent resisoc'h, hiziv, ebarzhiñ ur c'hateter en ur wazhienn en amboaz ren imbourc'hioù gwadloc'honiell, gwazhiellunadel, kalonvarr-wezadel.

cathode ◇ **cathode** ◇ **katod** g. Elektrod ereet ouzh blein leiel ur vammenn red.

cations ◇ **cations** ◇ **kation** s. Ion muivec'hiet; e-kerz an tredanrannañ e lusk ar c'hation etrezek ar c'hatod.

caudal ◇ **caudal** ◇ **lostel** aa. A-zave da lodenn a-dreñv ar rizhell.

caudal

• *bourgeon caudal* nov lostel • *intestin caudal* pervez lostel • *partie caudale de l'embryon* parzh lostel ar rizhell • *squelette caudal* atel al lost.

caus-

• *condition nécessaire et suffisante, cause* amplegad spirus • *épaississement induré causé aux paumes par la pression* tevaenn fetisaet dec'hanet gant ar gwask war ar palvoù • *la cause et l'étendue de l'inflammation* arbenn hag astenn an danijenn • *le rachitisme est causé par la carence en vitamine D₂* emañ negez ar vitamin D₂ e devoud al lec'h • *sans cause établie* hep arbenn savelet • *solution de continuité des téguments causée par un agent mécanique* odead devoudet en amwiskadoù gant ur gwezher treloc'hel • *troubles cardiaques causés par une perturbation du fonctionnement du corps thyroïde* direizhoù kalon e dianlen miarc'hwel ar skoedenn.

causalgie, syndrome causalgique, thermalgie ◇ **causalgia** ◇ **goriaz** b. Laur kreñv, poazhus er c'hroc'hen, hemañ o vont ruz, luf, c'hwezus, uc'heraezek, o c'hoarvezout peurliesañ da heul daraez un nervenn drobarzh, an nervenn greizer hag an nervenn a-skin pergen.

caustique ◇ **1 2 caustic 2 chemical cautery, chemocautery** ◇ **1 ezus** aa. **2 ezuzenn** b., **kimiezer** g. -ioù 1 A-zivout un danvezenn gimiek en araez da zistrujañ ar gwiadoù el lec'h m'he arloer. 2 Danvezenn ezus.

cautère ◇ **cautery** ◇ **1 ezer** g. -ioù **2 tanezer** g. -ioù **3 tommezer** g. -ioù (**tanezer** g. -ioù, **loskezer** g. -ioù, **tredanezer** g. -ioù), **yenezer** b. -ioù 1 Ardivink kaset d'ur gwrezverk uhel pe izel arveret da zistrujañ ur wiadenn, dec'han un drouskenn pe gwadkaeañ ur gouli. 2 Garenn ruziet en tan a arvered gwechall evel ezer. 3 Ardivinkoù ezañ arveret hiziv : al *loskezer* (garenn gleuz tommet dre ur redenn aezhenn o leskiñ), *tredanezer* (edañv platin dalc'het kann dre wered ur red tredan), *yenezer* (ezer o tanveziñ ar CO₂ sonnel), h.a. (sl. *cryocautère, electrocoagulation, galvanocautère, thermocautère, thermocoagulation*).

cautérisation ◇ **cauterization** ◇ **ezañ** Kalvezder yac'hadel o c'hoarvezout a zistrujañ ur wiadenn vev diwar-bouez ur gwezher fizikel : ar gwrezverkoù uhel (*tommezañ* : *tanezañ, loskezañ, tredanezañ*), ar gwrezverkoù izel (*yenezañ*), an danvezennoù kimiek (*kimiezañ*) (sl. *caustique, cautère*).

cautérisation chimique ◇ **chimical cauterization** ◇ **kimiezañ** Distrujañ ur wiadenn vev dre wered un danvezenn gimiek.

caverne ◇ **cavern, cavity, cavitation** ◇ **mougev** b. Enloezad e-barzh ur parenkim, er skevent pergen, da heul karzhadur ur pugnez, un dorzhell boukaet, ur marvennad breingedel; an termen a arverer peurliesañ a-zivout ar mougevioù torzhellek.

1 3 5 cavernoux 2 3 4 5 cavitaire ◇ **1 3 5 cavernous 2 3 4 5 cavitary** ◇ **1 keviaouek** aa. **2 kleuzennek** aa. **3 mougeviak** aa. **4 kleuzennel** aa. **5 mougevel** aa. 1 Dezhañ luniad an organoù sonnidik (sl. *corps érectile*). 2 A zo ennañ

ur gleuzenn pe kleuzennoù (sl. *cavité*). 3 A zo ennañ ur vougev pe mougevioù kleñvedel. 4 A-zave d'ar c'hleuzennoù. 5 A-zave d'ar mougevioù, da vougevioù ar skevent pergen.

cavernite ◇ **cavernitis** ◇ **keviaouekfo** g. Argaledad foel ar c'horfoù keviaouek.

cavernographie ◇ ◇ **keviaouekluniñ** Skinluniñ ar c'horfoù keviaouek goude ensinklañ enno un danvezenn skindemer.

cavernome, angiome caverneux, tumeur érectile, fungus hématoide ◇ **cavernous angioma, cavernous h(a)emangioma** ◇ **angiom** g. **keviaouek, yoc'henn** b. **sonnidik** Angiom o c'hoarvezout eus un trevnad loezennek heñvel ouzh hini ar c'horfoù keviaouek.

1 2 cavité ◇ **1 2 cavity** ◇ **1 kavenn** b. **2 kleuzenn** b. 1 Egorenn gorfadurel gloz. 2 Egorenn gleñvedel kloz e-barzh parenkim un organ (sl. *caverne*).

cavité abdominale ◇ **abdominal cavity** ◇ **kavenn** b. **ar c'hof** Kavenn bonnet en adreñv gant al livenn dargreiz hag ar c'higennoù sonner, a-gostez gant ar c'higennoù ledan, en araog gant ar c'higennoù eeun, rannet diouzh kavenn ar bruskl gant ar gerc'hspereun, kendalc'h et en traoñ gant kavenn al lestr; e kavenn ar c'hof emañ an darn vuiañ eus flugez ar benvegad koazhañ hag an organoù troazhañ.

cavité amniotique ◇ **amniotic cavity** ◇ **kavenn an amnion** Kavenn bonnet gant an amnion, leun gant ul liñvenn o c'hronnañ ar rizhell.

cavité buccale (proprement dite) ◇ **cavity proper of mouth** ◇ **kavenn ar genoù ent strizh** Parzh eus ar genoù loet a-dreñv ar gwaregoù munsunoù-dent (sl. *bouche*).

cavité glénoïde ◇ **glenoid cavity** ◇ **pezal** b. Arzkavenn hirgerc'hiek bonnet gant un pe lies askorn ha kenvellet gant ur skodenn, sk. : pezel ar planken skoaz.

cavité laryngée ◇ **cavity of larynx** ◇ **kavenn ar c'harloc'henn** Rann an aerforzhioù dezvonnet gant speurioù ar c'harloc'henn, tri hoskad ouzh he ober : an hoskad krec'h (pe us-tarzh), an hoskad krenn (pe a-darzh), an hoskad traoñ (pe is-tarzh).

cavité pelvienne ◇ **cavity of pelvis** ◇ **kavenn al lestr** Kavenn bonnet gant eskern an divlez, an askorn kroazell, an askorn belost hag ar c'higennoù ouzh o fallennañ, digor el laez e kavenn ar c'hof, klozet en traoñ gant ar c'harbedenn, rannet gant an digor krec'h etre al lestr bras el laez hag al lestr bihan en diaz.

cavité péricardique ◇ **pericardial cavity** ◇ **kavenn an amgalonenn** Kavenn vannek etre feilhenn a-flugez ha feilhenn a-speur an amgalonenn levrus.

cavité péritonéale ◇ **cavity of peritoneum** ◇ **kavenn an ampeleñ** Kavenn vannek etre div feilhenn, a-flugez hag a-speur, an ampeleñ.

cavité pleurale ◇ **pleural cavity** ◇ **kavenn ar grezenn** Kavenn vannek etre ar feilhenoù a-skevent hag a-speur eus ar grezenn.

cavité pulmonaire ◇ **pulmonary cavity** ◇ **kleuzenn** b. **skevent** Enloezad o tisoc'h eus un annon skevent (pugnez, yoc'henn marvennet, torzhell); ent klasel e reer *mougev* (Gl. *caverne*) eus ar c'hleuzennoù skevent torzhellek (sl. *caverne, cavité*).

cavité thoracique ◇ **cavity of thorax** ◇ **kavenn ar bruskl** Kavenn bonnet gant al livenn vrusk, ar c'hestad, ar glerenn hag ar c'higennoù ouzh o goleñ, dispartiet diouzh kavenn ar c'hof gant ar gerc'hspereun, enni ar skevent gronnet gant ar grezenn hag organoù ar poullkreiz : kalon ha gwazhied bras, briant ha bronkez kentañ, treizher, h.a.

cavité utérine ◇ **cavity of uterus** ◇ **kavenn ar grozh** Kavenn vannek arblat e diabarzh ar grozh, rannet e div lodenn gant ar strizh : ar gavenn a-c'houzoug kehent gant ar gouin, ar gavenn a-gorf ma vez loet ar vi e-doug ar bec'hiegezh.

cavographie, phlébocavographie ◇ **phlebography of the vena cava** ◇ **kavluniñ** Skinluniñ ar wazhienn gav uhelañ pe izelañ goude ensinklañ enni un danvezenn skindemer.

cavomanométrie ◇ ◇ **kavaskventerezh** g. Studi ar gwask e-barzh ur wazhienn gav.

cavopulmonaire : anastomose ~, **opération de Glenn** ◇ **cavalpulmonary anastomosis, Glenn's operation** ◇ **dasforzhañ kav-skevent** Oberatadenn c'houstegus ouzh an dulaz ganedigel, anezhi dasforzhañ penn-ouzh-penn ar wazhienn gav uhelañ ha talmerenn dehou ar skevent evit andreugañ gwad gwazhiennel trema ar skeventenn dehou ha disammañ ar c'hofig kleiz.

cavum, rhinopharynx, nasopharynx ◇ **cavum, rhinopharynx** ◇ **kavom** g., **fric'hargadenn** b., **PNA : lodenn a-fri kavenn ar c'hargadenn** Lodenn grec'h, aerforzhel strizh, ar c'hargadenn, a-us d'ar ouel stavn.

cécité ◇ **blindness** ◇ **dallentez** b. Ezvezañs klok ar gweled da heul anafoù loet en daoulagad, er forzhioù gweled pe er bluskenn weledel.

cécité corticale ◇ **cortical blindness** ◇ **dallentez a-bluskenn** Koll ar gweled diwar zistruj daoudo al leur rizennek pe leur 17, anezhi parzh ar bluskenn gilpenn ma tisoc'h ar saezhennadur a-weled en e bezh; evit d'ar gouziviad bezañ peurzall, n'en goar ket ha deskrivañ a ra ar pezh a haer gwelout; hevelep nammandenaoud a zispleger dre ezvezañs nep merzhad gweledel hep kantouezañ teñvalded; tremeniad e vez, o lezel al lec'h gant ar gwelandaoud.

cécité crépusculaire, cécité nocturne, amblyopie crépusculaire, hespéranopie, héméralopie, hypo-adaptation rétinienne ◇ **night blindness, nyctalopia** ◇ **dallder** g. **noz, bouc'hwel amheol, bouc'hwel** g. **issked** Dic'halloud da verzhout ar goulaouderioù bihan dre goll an argeskiñ ouzh an teñval (sl. *adaptation à l'obscurité*).

cécité des neiges, ophtalmie des neiges, niphablepsie, photophtalmie ◇ **ophtalmia nivalis** ◇ **erc'htrell g., skorndrell g., dallder an erc'heier, erc'hlagadfo g., luc'hlagadfo g.** Kevresaefo daoudu muiiek, lagadost, luc'hgaz, daeraouiñ, malvennadag, a-wechoù gouliez ar gorsae, o tarvezout etre 10 hag 20 eurvezh goude bezañ chomet war un erc'hvaez pe en ardizh gouloù an uhelvenez hep gwareziñ an daoulagad; pareañ a ra dindan un nebeut devezhioù hep arlenad.

cécité diurne, nyctalopie ◇ **day blindness** ◇ **dallder deiz, krakwel g. amheol, bouc'hwel ussked, krakwel issked** Perzh ar gweled o wellaat ouzh ar skedoù izel.

cécité littérale, agnosie des symboles graphiques ◇ **letter blindness** ◇ **nodanlenn g., andenaoud an arouezennoù** Furm anlenn ma vez ar gouziviad dic'houest da zigej an arouezennoù skrivet (lizherennoù ha sifrennoù).

cécité musicale, alexie musicale ◇ **music blindness** ◇ **sonanlenn g.** Furm anlenn ma vez ar gouziviad dic'houest da lenn notadur ar sonerezh.

cécité par éclipse de soleil, rétinite solaire ◇ **eclipse blindness, eclipse retinitis, solar retinitis** ◇ **heoldrell g., dallder diwar vougadenn heol, luc'hsaeo g. heolel** Anafoù al luc'hsae diwar arsellin ur vougadenn heol hep sil luc'h.

cécité pour les couleurs, achromatopsie, achromasie ◇ **achromatopsia** ◇ **livangwel g.** Ezvezañs ar galloud da verzhout al livioù, ganedigal pe arzeuat, dezhi arbennoù diseurt : naoued al luc'hsae (disleberad an hinkinnoù), tizhadur an nervenn weled pe ar bluskenn gilpenn (*livandenaoud*) (sl. *achromatopsie, agnosie pour les couleurs, dyschromatopsie*).

cécité pratique ◇ **legal blindness** ◇ **dallentez lezennel** Stad ar gweled dindan 1/20 lemmded (sl. *acuité visuelle*).

cécité psychique ◇ **mind blindness** ◇ **gwelandenaoud g.** Koll ar galloud da zenaout an neuzioù merzhet; kemm a lakaer etre lies furm : *gwelandenaout an traezoù* (sl. *agnosie visuelle*), *gwelandenaoud an enebrezhoù* pe *dremmandenaoud* (sl. *agnosie pour les visages, prosopagnosie*), *andenaoud an arouezennoù* pe *nodanlenn* (sl. *cécité littérale*), *andenaoud an amegor* pe *amegorandenaoud* (sl. *agnosie spatiale*), hemañ o vezañ alies untu : *andenaoud ul ledamegor* pe *ledamegorandenaoud*.

cécité verbale, alexie agnosique ◇ **word blindness** ◇ **geranlenn, andenaoud ar gerioù, anlenn andenaoudel** Furm gwelandenaoud o tougen war ar gerioù skrivet : emañ ar gouziviad dirak un destenn en ur yezh a anavez evel pa vije skrivet en ur yezh dianav (sl. *alexie agnosique*).

céder

• Instrument chirurgical permettant de faire céder la sténose des valves cardiaquesbenveg surjaniel araeuz da zienkaat isvoll trapigoù ar galon.

ceinture pelvienne, ceinture du membre inférieur ◇ **pelvic girdle** ◇ **gouriz g. an ezel traoñ** Rann al lestr ereet outi an izili traoñ, anezhi an daou askorn lez kenstaget aziaraok gant ar juntad a-gaezour, a-ziadreñv gant an askorn kroazell.

ceinture scapulaire, ceinture du membre supérieur ◇ **shoulder girdle** ◇ **gouriz an ezel krec'h** Rann ar brusk ereet outi an izili krec'h, anezhi a-ziaraok an daou drebez kenvellet gant dornell ar glerenn, a-ziadreñv an daou blanken skoaz.

-cèle

• *bubonocèle* barlennogad • *colpocèle* gouinogad • *cystocèle* c'hwezhegellogad • *rectocèle* youle'hogad • *suffixe désignant 1) une hernie, ex. : entérocéle, 2) une tumeur gazeuse ou liquide, ex. : hématocele, pneumatocèle, 3) une dilatation, ex. : bronchocèle* lostger oc'h aroueziñ 1) un avelenn, sk. : pervezogad, 2) ur yoc'henn aezhel pe liñvel, sk. : gwadvozhell, aezhvozhell, 3) ur volc'hadenn, sk. : bronkezvozhell.

cellulaire : tissu ~ sous-cutané ◇ **subcutaneous cellular tissue** ◇ **gwiad g. kellaouek endan-groc'hen** Furm eus ar gwriad kenglenel loet dindan ar c'hroc'hen, anvet c'hoazh *gwriad kenglenel laosk* (Gl. *tissu conjonctif lâche*) dre ma vez rouesoc'h enni ar gwiennoù kollagen, pe *gwriad lavnennek* (Gl. *tissu lamelleux*) dre ma vez stal et rezh kennenoù tanav; hervez an aozerion ez eo ar gwriad kellaouek pe ur parzh eus ar c'houdonenn, pe ar c'houdonenn he unan, pe ur gwriad dioutañ loet etre ar c'houdonenn hag ar faskienn; evit aozerion all ez eo ankantrat lakaat kemm etre ur gwriad kellaouek endan-groc'hen ha stummoù all ar gwriad kenglenel.

cellulalgie ◇ **cellulalgia** ◇ **1 kenglenost b. 2 behinost b.** 1 Laur a-geñver gant tanienn ar gwriad kenglenel (sl. *collagène : maladie du ~*). 2 Laur diwar ar behindofñ (sl. *cellulite*).

cellule ◇ **cell** ◇ **kellig b. -où** Unvez luniadel hag arc'hwelel eus ar gwiaodoù, dezhi beved emren ha hiliusted, anezhi un dolzenn brotoplasm gronnet gant ur golo, ar goc'henn, hag enni ur graoñell; ar bevion a anver *Protozoed* pa c'hoarvezont a ur gellig, *Metazoed* pa 'z a lies kellig d'o ober (sl. *cytologie, Métazoaires, Protozoaires*).

cellule amacrine, spongioblaste rétinien ◇ **amacrine cell** ◇ **kellig amakrin** Kellig nerval unvlein hep akson (sl. *rétine*).

cellule bipolaire ◇ **bipolar cell** ◇ **kellig daouvlein** Nervgellig dezhi daou astennad protoplasm.

cellule bordante, cellule pariétale ◇ **border cell, parietal cell, oxyntic cell** ◇ **kellig speurat** Pep hini eus ar c'helligoù ront bras a-strew e-barzh gwagrennoù deun ar stomok, e kenere gant oaled ar wagrenn dre ur ganolig enkitoplasmel, o vorc'hañ an drenkenn glorhidrek hag ar barenn enien.

cellule caliciforme, cellule mucipare ◇ **mucus cell, goblet cell** ◇ **kellig kibek, kellig glaourbar** Kellig epitelet kranennek, dezhi stumm ur gib, o vorc'hañ glaour, gwagrenn unkellig anezhi.

- cellule chromaffine, cellule phéochrome** ◇ **chromaffin cell, pheochrome cell** ◇ **kellig kromlen, kellig feokrom** Kellig a orin neuroektodermek bezant en he c'hitoplasm greunennadoù o treiñ gell e diastok ar bikromat kaliom; seurt dazgwered, graet kromlen anezhañ, zo erzerc'had oksiderezh daskediadoù ar c'hatekolaminou, naouus eo da gelligoù ar vezonuslouezhenn.
- cellule chromophobe** ◇ **chromophobe cell** ◇ **kellig livlez** Kellig eus ar rakkougorfenn na zalc'h ket nemeur liv an hematin-eozin.
- cellule-cible** ◇ **target cell** ◇ **1 kellig rodell 2 kellig vuk, kellig vuzer** 1 War al lifradoù livet gant ar May-Grünwald-Giems, hematienn a zo he c'hreiz hag he zrobarzh livet stank, etre an daou ur walenn sklaer; arvez sellet evel naouus d'an amwadoù islivel pe d'an amwadoù loezadel. 2 Kellig delanvadet a-ziuz gant un danvezenn danzeet en ul lec'h all eus ar bevedeg (sl. *récepteur*).
- cellule déciduale** ◇ **decidual cell** ◇ **kellig kollgenn** Kellig eus tonenn gelligparus an enkrozhenn, usteñvek gant ar vec'hiegi, puilh ar glikogen enni.
- cellule en bague (à chaton)** ◇ **signet-ring cell** ◇ **kellig lagadek** Kellig a zo en he c'hitoplasm un ebarzhenn vras, mukoproteinek peurliesañ, o tisvountañ ar graoñell d'an trobarzh, bezant en epiteliomou kolloidel.
- cellule endothéliale** ◇ **endothelial cell** ◇ **kellig endotelel** Kellig lieskornek, arblat, gousolet war un diazkennenn voan, o pallennañ diabarzh ar galon hag ar gwazhied gwad ha limf.
- cellule ganglionnaire** ◇ **ganglion cell** ◇ **kellig kangrennel** 1 Nervgellig eus al luc'hsae, oc'h amparañ trede mell ar forzh weled. 2 Nervgellig eus ar c'hangrennoù a-livenn pe ar c'hangrennoù simpatek.
- cellule géante** ◇ **giant cell** ◇ **keurgellig b.** Tolzenn brotoplasm direolek he stumm, enni un niver bras a graoñelloù, bezant en anafoù liesseurt, peurgetket e-barzh ar volc'henn dorzhellek; ivez en anafoù al lovrezh, ar brukelloz henek, an histiokitoz X, kleñved Crohn, ar sarkoidoz, an talmerennfo ividig.
- cellule grillagée** ◇ **Virchow's cell** ◇ **kellig treilhek** Histiokitenn eonek a zo bazhilli Hansen en he c'hitoplasm, spesadel d'al lovrezh lepromatus.
- cellule matricielle du tube neural** ◇ **matrix cell of neural tube** ◇ **mammgellig b. kanol an arc'hnerveg** Kellig eus speur kanol an arc'hnerveg o neriñ dre emrannañ hag o tiforc'hekaat e neuroblast, spongioblast hag ependimoblast.
- cellule-mémoire** ◇ **memory cell** ◇ **kellig vemor** Limfokitenn chomet ganti ar vemor eus keraez un antigen (sl. *amnésie immunologique*).
- cellule mitrale** ◇ **mitral cell** ◇ **kellig vintrek** Neuronenn loet en ognonenn ar c'hwesa, parzhiat he akson e stirad hag e rizennoù ar c'hwesa ha kenereet he c'horf kellig dre sinapsoù gant aksonoù ar c'helligoù c'hwesa loet e glourgenn ar fri.
- cellule multipotente, cellule pluripotente** ◇ **pluripotent cell** ◇ **kellig liesac'hus** Kellig rizhellel andiforc'hek a c'hell dont diouti un niver argrenn ac'hadoù kelligoù diforc'h (sl. *cellule totipotente, cellule unipotente*).
- cellule myoépthéliale, cellule en panier** ◇ **myoepithelial cell, basket cell** ◇ **kellig vioepitelel, kellig kavell** Kellig kaher levn a orin epitelel, steredennek, enni korredañvennoù argrezus, amlouc'het ouzh gorre hoganou ar gwagrennoù ezvorc'hañ (bronn, gwagrenn c'hweparañ, gwagrenn halv), o kendaoliñ dre argrezañ da argas ar vorc'hadenn.
- cellule neurosécrétoire** ◇ **neurosecretory cell** ◇ **kellig nervvorc'hañ** Neuronenn ganti an arc'hwel borc'hañ.
- cellule neurosensorielle** ◇ **neurosensory cell** ◇ **kellig nervskiantennel** Neuronenn arbennikaet en un arc'hwel skiantennel (kelligoù c'hwesa, hinkinou ha kegeliou al luc'hsae).
- cellule principale** ◇ **zymogenic cell** ◇ **kellig pennañ, kellig zimogenek** Pep hini eus ar c'helligoù niverus kranennek pe diñsek o pallennañ speurioù gwagrennoù piaoel ar stomok hag o vorc'hañ ar pepsinogen.
- cellule pyramidale** ◇ **pyramidal cell** ◇ **kellig pikernennek** Neuronenn eus pluskenn an empenn, e stumm ur bikernenn, etre 10 ha 100 µm sav, an dendrit diouzh he c'hern, an akson diouzh he diaz.
- cellule réticulaire** ◇ **reticular cell** ◇ **kellig rouedek** Kellig diloc'h, steredennek, diouti azledadoù hir kitoplasm kenvellet gant re ar c'helligoù amezek e doare ur rouedad; bezant eo e-barzh ar gwiad rouedek, anezhañ gwiad kenglenel dibarek an organoù gwadparañ (sl. *tissu réticulaire*).
- cellule totipotente** ◇ **totipotential cell** ◇ **kellig hollac'hus** Kellig rizhellel andiforc'hek a c'hell dont diouti an holl ac'hadoù kelligoù.
- cellule unipotente** ◇ **unipotent cell** ◇ **kellig unac'hus** Kellig rizhellel andiforc'hek na c'hell dont diouti nemet un ac'had kelligoù.
- cellules B, lymphocytes B, cellules bursodépendantes, lymphocytes bursodépendants** ◇ **B lymphocytes** ◇ **limfokit B, kelligoù B** Limfokit bihan o vorc'hañ an immunoglobulinou, gwezherioù an hangae dourennel; dont a ra ar B eus *bursa fabricii*, organ an evned ma c'hounez seurt limfokit o hangaer'hougou; en den ma 'z eont d'ober an 20 % eus limfokit ar gwad n'eo ket bet savelet c'hoazh lec'h o gougenkadur.
- cellules C (de la thyroïde), cellules parafolliculaires** ◇ **C cells** ◇ **kelligoù C, kelligoù lez-bolc'h** Kelligoù eus epitelienn bolc'hennou ar skoedenn, o vorc'hañ ar c'halkitonin.
- cellules déciduales** ◇ **decidual cells** ◇ **kelligoù kollgennel** Kelligoù bras a orin mezenkimatus bezant en enkrozhenn goude ma vez englenet ar vi speriët.

cellules ethmoïdales ◇ **ethmoid cells** ◇ **kelli l.** (u. : **kell b.**) **ar sileg** Aergavennoù stag ouzh kavennoù ar fri, loet e-barzh milendall ar sileg.

cellules immunocompétentes, cellules immunologiquement compétentes, cellules immuno-effectrices, immunocytes ◇ **immunocytes** ◇ **kelligoù hangaec'hougonek, kelligoù hangaevuzer, immunokit s.** Kelligoù eus ar gwiad limfotetikulel dezho un emell a bouez en erwezhoù hangaeel, daou rumm anezho : 1) al *limfokit B*, ar *plasmokit* hag an diaraogerioù anezho, o vorc'hañ an immunoglobulinoù, atebek war an hangae dourennel hag an erwezhoù dreistkizidigezh kentizhek ; 2) al *limfokit T* hag o diaraogerioù, gwezherioù an hangae gwiadell handizhek o tec'han darvoudoù dreistkizidigezh ampellet pe daleet (sl. *cellules B, cellules K, cellules T, hypersensibilité, immunité, système HLA*).

cellules interstitielles du testicule, cellules de Leydig ◇ **interstitial cells of testis, Leydig's cells** ◇ **kelligoù entremezel ar glidenn, kelligoù Leydig** Kelligoù tolpet en dro d'ar gwazhied gwad bihan e-barzh ar glidenn, o arc'hwel danzen an testosteron.

cellules K, lymphocytes K ◇ **killer cells, K cells** ◇ **kelligoù K, limfokit K** Kelligoù limfoidel hep gougon hangaeel, en araez, en ezvezañs ar glokaenn, da enniñvañ an antikorfoù (Ig G) bezant a gementadoù bihan (hag anniñvek betek eno) e gorre ar c'helligoù buzer ha keñverek da antigenoù ar re-mañ hag, e se, da zistrujañ ar c'helligoù buzer dre argerzh ar gelligpistriañ ; K zo tallizherenn ar ger saoznek *killer*.

cellules mastoïdiennes ◇ **mastoid cells, mastoid sinuses** ◇ **kelli l.** (u. : **kell b.**) **ar vrennigenn** Aergavennoù stag ouzh ar skouarn grenn ha loet e-barzh ar vrennigenn.

cellules nulles, lymphocytes nuls ◇ **null cell, null lymphocytes** ◇ **kelligoù mann, limfokit mann** Limfokit nad int na B na T ; arveret gant aozerion 'zo evel kenster da limfokit K pe NK.

cellules souches, cellules embryonnaires, cellules indifférenciées, cellules primordiales ◇ **stem cells, elementary cells, embryonal cells, primordial cells, formative cells** ◇ **bongelligoù l.(b.), kelligoù rizhellel, kelligoù andiforc'hek, kelligoù kezivik** Kelligoù etre 10 ha 20 µm treuzkiz, dezho ur protoplasm bazennlen e stumm ur c'hronnenn voan en dro d'ur graoñell vras amzoues, livadus tre, enni nukleoloù damzu ; anezho elfennoù yaouankañ an ac'hadoù o tisc'h gant kelligoù ar gwad ; bezant en organoù gwadparañ : er mel eskern evit ac'hadoù an eritrokit, ar granulokit, ar monokit hag ar planadon, en organoù limfoidel evit ac'had al limfokit ; e-kerz al leukemiezh lemm e teu ar bongelligoù da aloubiñ ar gwad hag ar mel eskern.

cellules suppressives, cellules T effectrices, cellules T-CD8+, lymphocytes T8+ ◇ **suppressive cells** ◇ **kelligoù astaler, kelligoù T buzer, kelligoù TCD8+, limfokit T8+** Seurtad limfokit T o skoilhañ ouzh erwezhangaeel (dourennel pe gelligel) ar bevedeg ouzh un allevenn (antigen) ; an divigad anezho a gevareazfe diwan an unanantikorfoù hag a ve en orin ar c'hleñvedoù unanhangaeel (sl. *cellules thymodépendantes*).

cellules T auxiliaires, cellules T activatrices, cellules T amplificatrices, cellules Ta, cellules T-CD4+, cellules T inductrices, cellules T « helper », lymphocytes T « helper », lymphocytes T-CD4+, lymphocytes T4+ ◇ **helper T-cells** ◇ **kelligoù T harper, limfokit T4+** Seurtad limfokit T o keveliñ gant al limfokit B evit genel antikorfoù ha, gant seurtadoù all limfokit T, evit savelañ an hangae kelligel ; war leiaat ez a ar c'heñver T4+ / T8+, par ent reol da 1,6 ± 0,5, e saviadoù gouziz an hangae, gant an haza da skouer (sl. *cellules thymodépendantes*).

cellules thymodépendantes, cellules T, lymphocytes thymodépendants, lymphocytes T ◇ **T lymphocytes** ◇ **limfokit T** Limfokit bihan gounezet ganto un hangaec'hougou dibarek dre zelnavad kelligel ha dourennel an toazon, gwezherioù an hangae kelligel ; dinoiñ a reont an antigen int bet kizidikaet outañ hag e zistrujañ dre gelligpistriañ pe dilaoskiñ hanteradoù hezileizh ha deluskañ gwered ar makrofag ; keveliñ a ra ur seurtad anezho, al *limfokit T4+*, gant al limfokit B evit reoliñ borc'hadur an antikorfoù dourennel ; al limfokit T a ya d'ober etre 60 ha 70 % eus limfokit ar gwad.

cellules tueuses naturelles, lymphocytes tueurs naturels, lymphocytes NK ◇ **natural killer lymphocytes, NK lymphocytes** ◇ **kelligoù K genidik, kelligoù NK, limfokit K genidik, limfokit NK** Kelligoù limfoidel diforc'h diouzh ar monokit, ar makrofag, ar c'helligoù K, al limfokit B ha hep mar diouzh al limfokit K ; hag int hep gougon hangaeel, emaint en araez da loezañ, en ezvezañs antikorfoù, ac'hadoù 'zo kelligoù limfoblastek dec'hanet gant ur viruz ; perzh o defe en emzifenn enepkankrel ; dont a ra NK eus *natural killer*.

1 2 3 cellulite 2 stéatométrie ◇ **1 3 cellulitis 2 steatomery** ◇ **1 kellaouekfo g., goudonnenfo g., kenglenfo g. 2 behindoñv g. 3 kelffo g.** 1 Tanijenn eus ar gwiad kenglenel kellaouek e kement lec'h ma vez, met dreist holl dindan ar c'hroc'hen, naouus dre argaledadoù laurus ha nervoustoù kilvers. 2 (Yezh ar pemdez) daspugnad behin dindan groc'hen talbenn diavaez an divlezh hag an divvorzhed gant ar maouezed yaouank, o reiñ d'ar c'hroc'hen un neuz vourellet pe galfrezet. 3 Tanijenn kelli ar vrennigenn (sl. *adiposalgie, cellulaire : tissu ~ sous-cutané, cellulalgie*).

cellulite diffuse, phlegmon diffus ◇ **phlegmona diffusa, phlegmonous cellulitis** ◇ **kellaouekfo strewek, goudonnenfo strewek, morfer strewek** Tanijenn vorferek ar gwiad kellaouek endan-groc'hen o tevoudañ ur varvenn ledek.

cellulite orbitaire ◇ **orbital cellulitis** ◇ **behinfo g. ar pod lagad** Tanijenn korf behinek ar pod lagad o tevoudañ kemoziz, raklagadegezh hag o tedreiñ a-wechoù etrezek al linañ (morfer ar pod lagad) (sl. *chémosis*).

cellulite pelvienne diffuse, périproctite septique diffuse, périrectite gangréneuse, phlegmon diffus périano-rectal ◇ **gangrenous periproctitis** ◇ **kenglenfo strewek al lestr, trofrazehfo g. lestek strewek, troyoulc'hfo g. breingedek, morfer strewek trofrazehyoulc'hel** Tanijenn strewek en dro d'ar youlc'h, peurliesañ e dianlen ur gouli er fraezh pe er youlc'h, o tizhout an diabetieon hag an alkooleion dreist holl.

cellulose ◇ **cellulose** ◇ **kelluloz** g. Daskediad digorvell an D-glukopiranoz (C₆H₁₀O₅)_n, parzhiad pennañ e kennenoù ar struzh, na c'hell ket kanol vezhur mab den e goazhañ, diziouerus evelket d'an trehentadur pervez en askont ma c'hoari roll ul lastr dre reiñ kantalc'h hag ec'honad d'ar c'hir boued.

cément ◇ **cementum, tooth cement** ◇ **diraskorn** g. Gwiad arvelen kalet o c'holeiñ dentin gwrieniñ an dent.

cémentoblastes ◇ **cementoblasts** ◇ **kementoblast** Kelligoù mamm ar c'hementokit loet war lez an diraskorn.

cémentoblastome ◇ **cementoblastoma** ◇ **kementoblastom** g. Yoc'henn dantparadel mezenkimatus setez e-kefin gwrieniñ an dant o c'hoarvezout a gementoblast hanweek hag a ziraskorn usparadek.

cémentocytes ◇ **cementocytes** ◇ **kementokit** s. Kelligoù oc'h amparañ an diraskorn.

cénesthésie ◇ **cenaesthesia** ◇ **emanglevoud** Merzhout anskiantennel an emgorf diwar-bouez anglevadoù strewek ha dispis o tont dre an eraeziñ anun- hag endonfraouadel.

cénestopathie, cénesthésiopathie ◇ **cenaesthopathy, cenesthesiopathia** ◇ **daremverzhad** g. Strafuilh an emanglevoud e rezh merzhadoù digunvez en organ-mañ organ : empenn, kalon, stomok, garloc'henn, organoù genel, h.a. e-maez a nep anaez anafel pe arc'hwelel, ar gouziviad oc'h ober anv a santadennoù strishadur, gweadur, kaletadur, goulloder, skornadur, dour skuilhet, h.a.; diforc'hiñ a reer an daremverzhadoù diouzh ar c'*hammeraeziou*, azon ar remañ eus un anaez kreudel, ha diouzh an *trezerc'hoioù emanglevadel*, lodek e taolenn glinikel ur psikoz (aozerion a venn ober eus an daremverzhadoù ur furm a drezerc'hoioù a 'n emanglevoud, hogen tra ma ro an trezerc'her un desteriadur ambreek eus e vuhezadoù, ne ra an daremverzher nemet deskrivañ e re).

cénest-

• *cénestopathe* daremverzher • *hallucination cénesthésique* trezerc'h emanglevadel • *impressions cénesthésiques* emanglevadoù.

-centèse

• *amniocentèse* ezwanañ an amnion, amnionezwanañ • *arthrocentèse* arzezwanañ • *paracentèse* karzhwanañ.

centre d'automatisme, pacemaker ◇ **pacemaker** ◇ **kreizenn b. emgefren, broudalf** g. Rannbarzh a 'r galon ma vez ganet ar broud loc'hañ, ent vonan ar c'hloim god-kentez.

centre de guidance infantile ◇ **child guidance centre** ◇ **kreizenn vabambroug** Diazezadur diougonvezegel o tegemer bugale vineuzidek.

centre de placement familial ◇ **foster home, family placement center** ◇ **kreizenn endredañ adfamilhel** Kreizenn o tegemer bugale a ranker pellaat, dre abeg pe abeg, diouzh o familh (sl. *placement familial*).

centre de post-cure ◇ ◇ **kreizenn diangur, diangurva** g. Diazezadur o tegemer gouziviaded stabiliet goude o c'hlañvdiadur ha n'int ket c'hoazh bagoliet (sl. *prévention, cure, post-cure*).

centre de réadaptation ◇ **rehabilitation center** ◇ **kreizenn azgouestaat** Diazezadur o tegemer tud goude o c'hlañvdiadur e sell da reiñ dezho an dro da aspiaouañ o barrezhioù micherel ha kedvuhez.

centre hospitalier ◇ **general hospital** ◇ **ospital g. hollek** Klañvdi foran evit ar prederiadoù berrbad gant pe hep herberc'hiañ, ennañ, ouzhpenn gwazrannoù boas an ospitalioù (mezekniezh ha surjianerezh hollek, trumadoù, dieraeziñ ha defraouiñ, benevouriezh, amiegouriezh, skeudennerezh mezegel, imbourc'hva bevoniel) gwazrannoù arbennikaet, lakaet er-maez ar gwazrannoù gourarbennikaet (sl. *hôpital*).

centre hospitalier régional ◇ **regional hospital** ◇ **ospital rannvro** Klañvdi diazset peurliesañ en ur benngêr, ennañ, ouzhpenn ar gwazrannoù boas hag arbennikaet, gwazrannoù gourarbennikaet (nervsurjianerezh, surjianerezh ar galon, treuzplanterezh organoù, kreizenn enepkontamm da skouer).

centre hospitalier spécialisé ◇ **specialty hospital** ◇ **ospital arbennik** Klañvdi ma prederier ur rumm kleñvedoù hepken, ar bredanaezioù (*bredospital*), ar c'hankroù, h.a.

centre hospitalier universitaire ◇ **university hospital center, teaching hospital** ◇ **ospital skolveurel** Trevnad amaezel o c'hoarvezout eus un ospital rannvro hag un pe lies unvez kelenn hag imbourc'h, e amkan stummañ ha kevraokaat ar c'hoskoriou mezegel diseurt (hollegourion, arbennigourion, klañvdiourion hag embregourion lezvezegel).

centre médico-psycho-pédagogique (CMPP) ◇ ◇ **kreizenn diougonvezegel** E Frañs, aozadur a zo e amkan diournat miazasadur skolel ha kedvuhez ar vugale, stlennañ ar gerent hag an atebieion, embreger an addiorren a zere.

centre phrénique ◇ **central tendon of diaphragm** ◇ **kreizenn stirennec** Lodenn greiz, stirennec, e stumm un delienn velchon, eus ar gelc'hspeurenn.

centres visuels, cortex visuel ◇ **visual centers, visual cortex** ◇ **kreizennoù gweled, pluskenn b. weledel** Rann eus ar bluskenn empenn a-geñver gant ar gweled, anezhi al leur rizennek (leur 17 Brodman), lec'h enodiñ an arhentoù gweledel e difourk ar saezhennadur a-weled, al leurioù tro-rizennek ha lez-rizennek (leurioù 18 ha 19) ma vez keweriet an arhentoù.

centreur lumineux ◇ **central beam** ◇ **stuc'henn b. vukañ** Hordenn luc'h en arun gant treug ar skinoù X, arveret er Skinouriezh da bukañ hemañ war al lec'h da imbourc'hiñ.

centrifugation ◇ **centrifugation** ◇ **tronizhañ** Danveziñ an nerzh kreiztec'h evit disrannañ parzhiadoù un arlugenn pe un dileizhenn golloidel, kreiztec'husted ar rannigoù o vezañ a-gevreizh gant o douester.

centrifugeur, centrifugeuse ◇ **centrifugal separator, centrifugal machine** ◇ **tronizher g. -ioù** Ardivink o tec'han, dre c'hwel dreñ, un nerzh kreiztec'h (a zewerzher dre gemer c'hwimm ar ponnerder g. da unanenn); kevaraezañ a ra buanaat gouzedadur ar rannigoù en arlung e-barzh al liñvennoù bevel, disrannañ da skouer elfennoù luniek ar gwad (tronizherezh tregemmel); c'hwimmoù o sevel betek 100 000 pe 200 000 g. a ziraezer er goullou gant an dreisttronizher.

centriole ◇ **centriole** ◇ **kentriol g. -où** Organit enkitoplasmel, unel pe daouel, loet er c'hentrozom.

centromère ◇ **centromere** ◇ **kenromer g. -ioù** Lodenn eus ar c'hromozom o keneren an daou gramatid, eleze an div elfenn disoc'het eus rannidigezh diahed ar c'hromozom da geñver ar mitoz pe ar meioz, hag a yelo d'ober an daou gromozom mab.

centrosome ◇ **centrosome** ◇ **kenrozom g.** Organit enkitoplasmel e-kefin ar graoñell, lodek e kreizenn ar gellig, dezhañ neuz un ec'honenn vihan a gitoplasm douesoc'h oc'h enderc'hel daou gentriol.

centr-

- *cavité centrale* kavenn greiz • *cellule à noyau central* kellig kreizek he c'hraoñell • *centre apneustique* kreizenn heudanal
- *centre de la pupille* kreiz ar mab lagad • *centre géométrique de la rétine* kreiz mentoniell al luc'hsae • *centre de rotation de l'œil* kreiz c'hwelañ / c'hwelgreiz al lagad • *centre et périphérie* kreiz ha trobarzh • *centres diencéphaliques* kreizennoù an treuzempenn • *centres respiratoires bulbaires* kreizennoù hirvel an analañ • *centrifugation différentielle* tronizherezh tregemmel
- *centrifugeabilité* kreiztec'husted • *centrifuger* tronizhañ • *conduction centrifuge de l'influx nerveux* ren kreiztec'h an nervlanv
- *effets myorelaxants, décontracturants centraux* gweredoù istantus, dizargrezus a-greiz • *émétique à mécanisme d'action centrale* c'hweluzenn greizweredus • *faire agir la force centrifuge par rotation* tronizhañ • *force centrifuge* nerzh kreiztec'h • *faisant partie du centre de la cellule* lodek e kreiz ar gellig • *juxtacentral* nes-kreiz • *noyaux gris centraux* gronnoù louet a-greiz • *trouble d'origine centrale* strafuilh a orin kreizel • *ultracentrifugeur* dreisttronizher.

cénurose, cœnurose ◇ **cenurosis** ◇ **kenuroz g.** Argevezadur ar bevedeg gant larved (*kenur*) kestod eus ar seurtad *Tenia multiceps*, arvevadur ar c'hi en o stad oadour, naouus dre anafoù marvus en empenn.

céphalgie ◇ **cephalalgia, headache** ◇ **kloppennad b.** Laur er gloppenn (yezh ar pemdez : *droug penn, poan benn*).

céphalée ◇ **headache, cephalalgia** ◇ **kloppennad g.** Poan benn brevus ha dalc'hus; evit aozerion 'zo ez eo kenster an daou dermen *céphalalgie* ha *céphalée* (sl. *algie cranio-faciale, algie vasculaire de la face, céphalée durale, céphalée vasculaire de Horton, migraine*).

céphalée durale ◇ **dural headache, meningeal headache** ◇ **kloppennad tevbilhonel, kloppennad pilhonel** Laur dalc'hus goude ur gwezh o c'hloazañ ar bilhonenn dev, an dieraenziñ wardevel da skouer.

céphalée vasculaire de Horton, céphalée histaminique, céphalée par hyperhémie, érythromélgie céphalique, syndrome de Bing, syndrome paramigraineux, syndrome de vasodilatation hémicéphalique ◇ **Horton's syndrome** ◇ **azoniad Horton, kloppennad gwazhiedel Horton, kloppennad dre c'hourwad, kernadvan b., aziadiad gwazhiedfrankadel al ledpenn** Seurtad nervostegezh a 'n dremm naouus dre laurioù poazhus grezvarrek en ul ledkloppenn war un dro gant ar santadur poanius a dalmoù e-barzh ar c'hloppenn ha strafuilhoù gwazhiedloc'hadel el leddremm hag an ezel krec'h a-gendu; padout a ra ar gwaskadoù etre 24 h ha lies sizhunvezh.

céphalhématome ◇ **cephalhematoma** ◇ **gwatoñv g. ar volzpenn, bolzpennwatoñv g.** Gwatoñv endan-amaskornenn e bolzpenn ar grouell (peurliesañ war an askorn kitem), bevennet bepred gant ur vellez; dinodiñ a ra en deizioù goude ar c'hanedigezh hag assuget e vez gorrek.

céphalhydrocèle traumatique ◇ **traumatic cephalhydrocele** ◇ **dourvozhell**ˆ. daraezel ar c'hloppenn Yoc'henn o sezañ dindan ar brigenn, enni liñvenn benn-kein; darvezout a ra gant ar bugel diwar un odead daraezel er volzpenn (torr, disvellez).

céphalogenèse ◇ **cephalogenesis** ◇ **pennbarañ** Hollad an argerzhioù eus neuztarzh ar penn.

céphalosporines ◇ **cephalosporins** ◇ **kefalosporineier l. (u. : kefalosporin g.)** Stroll bevestalorioù eus kerentiad ar betalaktamineier; douhennet e vez ar seurtad naturel eus ar *Cephalosporium*, foue nes d'ar *Penicillium*; ledanoc'h eo o skalfad bevestaliñ eget hini ar penikillineier; harzusoc'h int ivez ouzh ar penikillinaz, nemet int pistriusoc'h ouzh al lounezhi.

céphalotomie, céphalotripsie ◇ **cephalotripsy** ◇ **pennfrikañ** Gwezh surjianeel a oa anezhañ gwechall diren mentoù penn ar grouell varv *in utero* war-benn he eztennañ dre ar forzhioù natur (sl. *basiotripsie*).

cépal-

- *céphalothorax (Arachnides)* kefalotoraks (Araknid) • *hydrocéphalie* empennfoeñ • *liquide céphalorachidien* liñvenn benn-kein
- *présentation de l'extrémité céphalique du fœtus* erload eizhaenn grec'h ar grouell.

cérat ◇ **cerate, ceratum** ◇ **kerat g.** Ogan da von ennañ ur meskad koar hag eoul, danvezet da ambrougenn da wezherioù mezegel diseurt er Groc'henouriezh hag evel kentaozad en angevezhioù gwezeladel.

cercaires ◇ **cercariae** ◇ **kerker s.** Furm larvel rez ha loc'hus tre e dibenn emdrogor ar preñved arvevat eus urzhad an Nematod, isurzhad an Distomianed.

cerceau de lit ◇ **cradle** ◇ **kouc'henn b. wele** Hantergranenn graet gant garennoù metal o terc'hel al liñsel hag ar pallennoù a-zistok diouzh korf ar c'hlañvour gweleet.

cerclage ◇ **banding, cerclage** ◇ **fretañ** Steudellañ disloc'h ouzh torroù 'zo (torroù a-viñsell, a-veskell, torroù ar padelleg), anezhañ kengovliñ an tammoù askorn hag o c'helc'hennañ diwar-bouez un neudenn vetal.

cerclage de l'artère pulmonaire, opération de Dammann-Muller ◇ **pulmonary artery banding** ◇ **fretañ kef ar skevent** Desezañ ur gelc'henn amwaskañ en dro da dalmerenn ar skevent evit diren kas ha gwask ar gwad, graet war ar magadelled o tougen ur c'halonnaoued ganedigel gant heptreug kleiz-dehou hag uswask talmerel skevent muiek, gwezh goustegus da c'hortoz an hegoulz evit oberata ar gammneuziad.

cerclage du col, isthmorrhaphie ◇ **cerclage procedure, isthmorrhaphy** ◇ **fretañ strizh ar grozh, strizhfretañ** Gwezh surjianeel eeun embreget etre trede ha c'hwec'hvet miz ar vrazeded evit parraat ouzh an divec'hiegañ emdarzh diwar zislev ar strizh, anezhañ amwaskañ gouzoug ar grozh diwar-bouez un argoulm.

cérébelleux : syndrome ~ ◇ **cerebellar syndrome** ◇ **azoniad ilpennel** Teskad ar strafuilhoù navel diwar un anaf ilpenn, anezho dreist holl direzhoù an diasav ha kerzhed mezedeck : digenurzh a 'r fiñval : (uc'haen, miaen, diskemal a 'r fiñvou), andasfiñv, ankedal, istant (damougoù momeder), ankedre (hemañ diasavel ha lec'hiet en izili traoñ a-geñver gant tizhadoù ar preñv ilpenn, pe diafiñvel ha lec'hiet en izili krec'h a-geñver gant tizhadoù an hanterennou ilpenn).

cérébellite ◇ **cerebellitis** ◇ **ilpennfo** Furm melpennfo lec'hiet en ilpenn.

cérébell-

- *ataxie cérébelleuse* ankedre ilpennel
- *atrophie cérébelleuse* isteñv an ilpenn, ilpennisteñv
- *démarche cérébelleuse* kerzhed ilpennel
- *démarche cérébellospasmotique* kerzhed ilpennandagel
- *hémisindrome cérébelleux* ledazoniad ilpennel
- *signes cérébelleux* arouezioù ilpennel
- *syndrome cérébellosympathique* azoniad ilpennel-simpatek
- *syndrome de l'artère cérébelleuse postéro-inférieure* azoniad talmerenn izelañ adreñv an ilpenn
- *syndrome de l'artère cérébelleuse supérieure* azoniad talmerenn uhelañ an ilpenn
- *syndromes cérébellothalamiques* azoniadoù ilpennderc'hvelel.

cérébral ◇ **cerebral** ◇ **empennel** aa., ~ **empenn** A-zave d'an empenn (sl. *accident vasculaire cérébral, cerveau, encéphale, ramollissement cérébral*).

cérébro-angiosclérose ◇ **cerebral atherosclerosis** ◇ **ateroskleroz** g. **empenn** Skleroz gwazhied an empenn.

cérébromalacie ◇ **cerebromalacia** ◇ **empennvloed** g. Boukadur an empenn.

cérébrome ◇ **cerebroma** ◇ **kerebrom** g. Yoc'henn a zo he elfennoù a rizh navel : c'hoarvezout a ra ar stroma anezhi a nevroglia oc'h enderc'hel en e vilhoù neuroblast rizhellel ha kelligoù navel all.

cérébroscclérose ◇ **cerebroscclerosis** ◇ **skleroz** g. **an empenn, empennskleroz** g. Anafoù an empenn e dianlen an ateroskleroz, naouus, ent neuziadurel dre annonoù loezennek hag, ent klinikel, dre ar seizi gaouhirvelel.

cérébrospinal ◇ **cerebrospinal** ◇ **empennmelel, empenn-mel** A-zave d'an empenn ha d'ar mel a-livenn (sl. *liquide céphalorachidien*).

cérébr-

- *cérébrosidose* kerebrozidoz
- *syndrome cérébro-costomandibulaire* azoniad empenn-kestad-gaved
- *syndrome de l'artère cérébrale antérieure* azoniad talmerenn arak an empenn
- *syndrome de l'artère cérébrale postérieure* azoniad talmerenn adreñv an empenn.

certificat de capacité ◇ ◇ **testeni** g. **barregezh** E Frañs, diplom stad pe diplom skol veur debaret d'an emstriverion o deus heuliet gant berzh ur stummadur lezvezegel lavaret.

certificat d'Études Spéciales ◇ ◇ **testeni Studi Arbennik** E Frañs, diplom debaret gant ar skolioù meur d'an emstriverion o deus heuliet ur c'helennadur arbennik devredet dre ziferad maodiern, o c'hrataat ur perzhegadur angemeret gant Kuzul Urzh ar Vezeion.

certificat médical ◇ **medical certificate** ◇ **testeni mezeg** Testeni debaret gant ur mezeg evit stadañ ha, diouzh an dro, desteriañ devoudoù yec'hedel.

certificat prénuptial ◇ **premarital certificate** ◇ **testeni rakpriediñ** Testeni debaret gant ur mezeg d'an danvez priedoù daou viz d'ar muiañ arak o dimeziñ, o tiogeliñ ez eo bet graet outo un imboure'h klinikel hag imboure'hioù amglinikel 'zo (en o zouez prouadoù diurnat an haza).

cérumen ◇ **cerumen, ear wax** ◇ **mel** g. **skouarn, kerumen** g. Danvezenn libous gell arvelen o tisoc'h diwar meskad borc'hadennoù ar gwagrennoù kerumen hag ar gwagrennoù soav, o lifrañ gorre ode diavaez ar c'hleved, ganti ur roll gwareziñ.

cérum-

- *bouchon de cérumen* stev mel skouarn, stev kerumen
- *glande cérumineuse* gwagrenn gerumen.

cerveau ◇ **brain, cerebrum** ◇ **empenn** g., **mel** g. **penn** Lodenn uhelañ hag ec'honekañ ar mel navel; evit aozerion 'zo, ez eo kenster *empenn* ha *mel penn*, oc'h arouezañ al lodenn eus an nerved kreiz endalc'het gant ar c'hloppenn (eleze an *empennent* strizh, an ilpenn, hag ar *c'hef empenn*); evit re all, ent resisoc'h, e verk *mel penn* (PNA *encephalon*) endalc'had navel ar c'hloppenn hag *empenn* (PNA *cerebrum*) al lodenn eus ar mel penn loet dreist telt an ilpenn (anezhi an div *hanterenn empenn* hag an *derc'hvelempenn*) (sl. *diencéphale, encéphale, hémisphère, mésencéphale, prosencéphale, rhombencéphale, télencéphale, thalamencéphale*).

ervelet ◇ **cerebellum** ◇ **ilpenn** g. Bloc'h danvezenn navel o c'henniñ an darn vrasañ eus poull adreñv ar c'hloppenn, loet dindan delt an ilpenn, a-dreñv ar c'hef empenn hag ereet outañ diwar-bouez an tri re droadoù ilpenn; lodenn eus an dregempenn, ouzh he ober ur rannbarzh kreizer, ar *preñv* (PNA *vermis*), ha div dolbezenn gostezel pe *hanterennou ilpenn* (PNA *hemispherium*

cerebelli); evel hanterrennoù an empenn, e c'hoarvez an ilpenn eus ur *bluskenn* louet o pallennañ ur *steuñvenn wenn* a zo en he c'hreiz tolzennoù louet pe *gronnoù ilpenn* (PNA *nuclei cerebelli*); roll an ilpenn eo reoliñ ar c'hempouez, an tant, kedren ar fiñval diarvenn hag ar fiñval diarzoug.

ervelet : **noyaux gris centraux du** ~ ◇ **cerebellar nuclei** ◇ **gronnoù l. (g.) ilpenn** Tolzennoù steuñvenn louet loet don en ilpenn, pevar re anezho : daou e-tal ar preñv, *gronnoù ar c'hanto*, ouzh o c'hostez diavaez ar *gronnoù boullek* ha, pelloc'h, ar *gronnoù dentek*, ouzh o c'hostez diabarzh ar *gronnoù ibilek*.

ervelet : **tente du** ~ ◇ **tentorium cerebelli** ◇ **telt g. an ilpenn** Speur etre empenn hag ilpenn, azledad diwar bilhonenn dev ar mel penn, dezhañ stumm ur greskenn stignet etre div warenn, ur *warenn vras* enlenet ouzh ribl krec'h ar garregenn adalek ar balegoù gweleek adreñv hag ouzh nant ar god treuz, ur *warenn vihan* enlenet ouzh ar balegoù gweleek araok, he ribl rez o tezvonnañ *ask an telt ilpenn*, toull ma tremen kef an empenn eus poull adreñv da boull krenn ar c'hloppenn.

ervelet

• *lobe antérieur du cervelet* flipezenn bevarc'hognek, tolbezenn grec'h an ilpenn, talbenn krec'h an hanterrennoù ilpenn • *lobe postérieur du cervelet* tolbezenn adreñv an ilpenn, talbenn traoñ an hanterrennoù ilpenn.

cervical ◇ **cervical** ◇ **gouzougel aa.**, **gouzoug** A-zave d'ar gouzoug, da c'houzoug ar grozh, ar c'hwezhiell pe an askorn morzhed.

cervicalgie ◇ **cervicodynia** ◇ **chougost b.** Laur el livenn c'houzoug.

cervicarthrose ◇ **osteoarthritis of the cervical spine** ◇ **artroz g. ar choug, chougartroz g.** Remm henek dic'henezhadel al livenn c'houzoug; devoudañ a ra nervostoù er blezhad gouzoug-brec'h.

cervite ◇ **cervicitis** ◇ **gouzoufgo g.** 1 Tanijenn gouzoug ar grozh; hervez ma 'z eo tizhet lodenn diavaez ar min tañch (rann a-c'houin ar gouzoug) pe al lodenn diabarzh e reer anv a-getep eus *ezgouzoufgo* hag *engouzoufgo*. 2 Tanijenn gouzoug ar c'hwezhiell.

cervicobrachial : **syndrome douloureux** ~ ◇ **cervicobrachial syndrome** ◇ **azoniad gouzoug-brec'h** Laurioù en ezel krec'h, a rizh gwrizienneel (C7-D1), kevret a-wechoù gant ur gouseizi hag un isteñv kaher, kammeraeziou (kemenerion, loskadur-ezh), anadennoù gwazhiedloc'hadel (gwazhiedstrishaat, azoniad Raynaud) o tarvoud mont betek an tromboz talmerel; azoniad untu strizh diwar amwask pe danailh ar gwriziennoù navel hag an dalmerenn endan-drebez gant ur gostezenn c'houzoug, un usteñv eus baleg treuz ar 7^e mellenn c'houzoug, un ezreolder eus ar gostezenn gentañ pe eus ar c'higennoù skeuliek.

cervicobrachialite ◇ ◇ **gouzougbrec'hfo g.** Gwrizienfno plezhad ar vrec'h o tec'h an straufuilhoù an eraeziñ (laur, kammeraez), al loc'hañ (seizi), an damougoù hag ar gwazhiedloc'hañ en tiriadoù nervaouet.

cervicocystopexie ◇ **cervicocystopexy** ◇ **Aanlenañ gouzoug-c'hwezhiell** Gwezh surjanel evit parraat ouzh an troazhandalc'h diwar striv gant ar vaouez, anezhañ skourrañ ar c'han troazh ha gouzoug ar c'hwezhiell ouzh ar c'higennoù eeun hag ouzh talbenn adreñv juntad ar c'haezour.

cervicopexie ◇ **cervicopexy** ◇ **Aanlenañ gouzoug, gouzougAanlenañ** Festañ surjanel ur gouzoug (krozh, c'hwezhiell).

cervicotomie ◇ **cervicotomy** ◇ **enbenañ gouzoug, gouzougenbenañ** 1 Flañchañ surjanel gweleadoù kroc'hanel, faskiennel ha kaherel ar gouzoug war-benn oberata donoc'h war ar gwazhied, an nervernoù pe ar flugez. 2 Flañchañ surjanel gouzoug ar c'hwezhiell.

cervicovaginite ◇ **cervicovaginitis** ◇ **gouzouggouinfo g.** Tanijenn gouzoug ar grozh hag ar rannbarzh kefin eus ar gouin.

césarienne, opération césarienne, hystérotomie abdominale ◇ **caesarean operation** ◇ **skejañ kezarian, kezarian g., krozhbenbenañ a-gof** Flañchañ ar grozh vec'hiek, en he lodenn draoñ hogos bepred, war-benn eztennañ ar grouell hag an dorzhienn; daou hent a vez d'ar c'hezarian : an hent a-gof, bepred en arver, an hent a-c'houin dilezet rak dañjerus; an anvad *kezarian* a voe lakaet war an oberatadenn-mañ e koun eus Iulius Caesar bet eztennet en doare-se eus kof e vamm (a varvas da heul).

césium 137 ◇ **radiocesium** ◇ **keziom 137 g., radiokeziom g.** Skinelfenn, he arouez ¹³⁷Cs, ganet diwar ar skiriañ derc'hanel; digevanañ a ra en ur leuskel ur skinad β⁻ ha treiñ e bariom 137m, hemañ o tiargridañ dre ec'hodiñ ur skinad γ a 0,661 MeV; 30 vloaz eo hanterhoali ar c'heziom 137; er Yac'hadouriezh e vez danvezet e-barzh tolgennoù pellgeziomgurañ pe e korzennoù ha nadoziou neskurigurañ (sl. *curietherapie, télécésiumthérapie*).

césium

• *césiumthérapie du cancer du sein* keziomgurañ kankr ar vronn • *télécésiumthérapie* Pellgeziomgurañ.

Cestodes ◇ **Cestodes** ◇ **Kestod s.** Urzhad preñved eus kevrennad ar *Plathelminth* (kest plat, lenkern) a neuz lurellek, rannek o c'horf, hep kanol vezhur, pep gwalenn o vezañ divrevék, gant organoù spegañ en o fenn araok (mandoziou pe greier); gougevret outi ar genadoù *Tenia* ha *Botriokefal* arvevat, en o stad oadour e-barzh pervez an den hag al loened, en o stad larved e-barzh gwiaoù ha flugez o danvevad.

cestodose ◇ **cestodiasis** ◇ **kestodiaz g.** Kleñved diwar arvevadezh kest eus urzhad ar C'hestod, pe en o stad oadour (*botriokefaliaz, teniaz*), pe en o stad larvel (*ekinokokoz, kistikerkoz, kenuroz, sparganoz*).

cétogène ◇ **ketogenic** ◇ **1 ketonbar aa. 2 ketonbar g. -où 3 ketonbarañ** 1 En araez da c'hanel korfoù ketonek, sk. : an *amindrenkennoù ketonbar*. 2 Korf ketonbar. 3 A-zave d'ar genel korfoù ketonek, sk. : *arc'hwel ketonbarañ an avu*.

cétogénèse ◇ **ketogenesis** ◇ **ketonbarañ** Genel korfoù ketonbar.

cétolyse ◇ **ketolysis** ◇ **ketonloezañ** Dispenn ar c'horfoù ketonek, o c'hoarvezout dre oksidañ er gwiadoù.

cétonémie ◇ **ketonaemia** ◇ **gwadvec'h g. keton, ketonwadvec'h g.** Feur ar c'horfoù ketonek e plasma ar gwad, etre 5 ha 15 mg/l ent reol.

cétonique : corps ~s ◇ **ketone bodies** ◇ **korfoù l. (g.) ketonek** Danvezennoù (*aketon, trenkenn diaketek, trenkenn β-oksibutirek*) o tont diwar ec'haozadur an albumineier hag an druzennoù; dispennet er c'horf ent vonan, o chom bezant e bevedeg an diabeteg ma tevoudont darvoudoù an akidoketoz (sl. *acidocétose*).

cétonurie ◇ **ketonuria** ◇ **1 troazhvec'h g. keton, ketondroazhvec'h 2 troazhketonegezh b.** 1 Feur ar c'horfoù ketonek en troazh, mannel pe vezant a-louc'hadoù ent reol. 2 Bezañs korfoù ketonek en troazh.

17-cétostéroïdes ◇ **17-ketosteroids** ◇ **17-ketosteroid s.** Stroll hormonou deveret diwar ar steroloù ha naouus dre vezañs ur bonad keton e 17, ganto ur gwered androgen hag ur perzh e kennevidoù ar protid, an ion Ca, Na ha K; borc'het gant ar glidenn hag ar gaenuslounezhenn, ezvevnet dre an troazh ma vez o feur reol dre 24 h etre 28 ha 90 μmol (8 hag 26 mg) gant ar gwaz, etre 14 ha 49 μmol (4 ha 14 mg) gant ar vaouez.

céto-

- *acide cétonique* trenkenn getonek
- *cétose* ketoz
- *diabète sucré non cétonique* diabet c'hwek anketonel.

Chagas : maladie de ~, thyroïdite parasitaire, trypanosomiase américaine, fièvre barbeiro ◇ **Chagas' disease, American trypanosomiasis, schizotrypanosis, opilation** ◇ **kleñved Chagas, tripanozomiaz g. amerikan, skoedennfo g. arvevadel** Kleñved arvevadel broreuziat e Su- hag e Kreizamerika peurliesañ e-touez bugale ar poblañsoù ploue izel o barr bevañ, devoudet gant ur zooflagelleg gwadtrigat, an *Trypanosoma cruzi*, treuzkaset dre ziouladoù Reduviideged gwadezat eus ar genad *Triatoma*; en e brantad lemm e naou ar c'hleñved dre anafoù kroc'hen ha glaourgen (chagom) gant gouliñv an dremm hag ar malvennoù, c'hwarnnoù, strafuilhoù koazhadel, usvent ar skoedenn, an avu hag ar felc'h, un derzienn direoliek; marvus e vez alies; lies furm henek ez eus, da azonoù dezho miksedem, tanijenn ar c'haher kalon hag ar pilhon, peluzoù, bredanaezioù.

chagome ◇ **chagoma** ◇ **chagom g.** Livant enkoriñ an tripanozomiaz amerikan (kleñved Chagas), dezhañ stumm ur goeñvenn eus ar c'hroc'hen hag ar gwad kellaouek endan-groc'hen diwar neridigezh lec'hiek an arvevad en e stumm amastigot.

chaîne ganglionnaire (lymphatique) ◇ **lymph trunk** ◇ **hedad g. gwerblennoù** Aridennad werblennoù, ereet kenetrezo, loet a-hed ur wazhiedenn.

chaîne ganglionnaire de la coronaire stomachique ◇ **left gastric lymph nodes** ◇ **gwerblennoù l. (b.) talmerenn gleiz ar stomok** Hedad gwerblennoù loet a-hed talmerenn gleiz ar stomok, o teoueriañ al limf eus div drederenn diabarzh korf ar stomok ha diadraoñ an treizher.

chaîne ganglionnaire de la jugulaire interne ◇ **deep cervical lymph nodes** ◇ **gwerblennoù don ar gouzoug** Hedad gwerblennoù loet e-maez pe dirak ar wazhienn agerc'henn diabarzh, o teoueriañ al limf eus lodenn araok ar penn hag ar gouzoug.

chaîne ganglionnaire hépatique ◇ **hepatic lymph nodes** ◇ **gwerblennoù an avu** Aridennadoù gwerblennoù loet a-hed talmerenn voutin an avu hag ar barroù diouti.

chaîne ganglionnaire latérorachéale ◇ **tracheobronchial lymph nodes** ◇ **gwerblennoù ar vriant** Aridennad werblennoù loet a-gleiz hag a-zehou d'ar vriant, lodek e hedadoù gwerblennoù flugezel ar brusk.

chaîne ganglionnaire mammaire externe ◇ **axillary lymph nodes** ◇ **gwerblennoù kazel-brennid** Aridennad werblennoù loet a-hed gwazhied kostezel ar brusk, o teoueriañ al limf eus ar vronn hag eus speur araok kostezel ar brusk hag ar c'hof a-us d'ar begel.

chaîne ganglionnaire médiastinale antérieure ◇ **innominate lymph nodes** ◇ **gwerblennoù araok ar poullkreiz** Hedad gwerblennoù loet e diaraog gwazhied bras ar poullkreiz.

chaîne ganglionnaire splénique ◇ **pancreaticosplenic lymph nodes** ◇ **gwerblennoù ilgreiz-felc'h** Aridennad werblennoù loet a-hed talmerenn ar felc'h hag ar barroù diouti.

chaîne respiratoire ◇ **respiratory chain** ◇ **gwidenn b. analadel** Kemalenn enzimel o ren e-barzh ar mitokondri dazgweredoù oksidañ-diren an analañ kelligel dre zezougen an atom hidrogen hag an elektron.

chaîne sympathique ◇ **sympathetic trunk** ◇ **kef g. simpatek** Teskad kangrennoù loet a-gleiz hag a-zehou da gorf ar mellennoù, ereet kenetrezo dre varroù etre-kangrennoù, oc'h amparañ lodenn drobarzh an nerveizhiad simpatek.

chaîne

- *acides gras à chaîne longue* trenkennoù druz digorvell hir
- *chaîne de mesure* ristenn vuzuliañ
- *chaîne hydrocarbonée* digorvell hidrokarbonnek
- *chaîne métabolique* gwidenn ar c'hennevid
- *chaîne polypeptidique* digorvell polipeptidek
- *constitué par de longues chaînes de D-glucose* ouzh e ober digorvelloù hir a Dglukoz
- *maladies des chaînes légères* κκ ou λ kleñvedoù an digorvelloù skañv χ pe λ
- *maladies des chaînes lourdes* α, γ ou μ kleñvedoù an digorvelloù ponner α, γ pe μ
- *reliant les deux chaînes spirales de l'ADN* oc'h eren an daou arrevell troellennek DNA.

chair de poule, réaction ansérine ◇ **cutis anserina** ◇ **houpigañ, erwezh g. an houpigañ** Argrezañ gwiennnoù levn ar bolc'hennoù blev, oc'h ober d'ar blev hirisiñ gant ar yenion pe an efreizh.

chalarose ◇ **chalarosis** ◇ **kalaroz** Mikoz diwar foue eus ar genad *Chalara*, anezhañ pugnezoù endan-groc'hen.

chaliasie ◇ **chaliasia** ◇ **usgad** *g.* Laoskaat reñverek ar c'higennoù, peurgetket kigennoù traoñ an treizher ha kelc'hstrishaer gwask krec'h ar stomok (sl. *achaliasie*).

chalazion ◇ **chalazion** ◇ **kalazion** *g.* Yoc'henn guñv bihan kistek evodet er valvenn diouzh ur wagrenn dars, a-wechoù da heul ur stuienn.

chalcose ◇ **chalcosis** ◇ **kalkoz** *g.* Daspugn kouevr er gwiadoù, en daoulagad pergen.

chalone ◇ **chalone** ◇ **chalon** *g.* Borc'hadenn ur gwiad o leiaat pe o heudañ gwerederezh ur gwiad all.

chambre d'attrition musculaire ◇ ◇ **esaou** *g.* **an tarav (kaherel)** Tachad ar c'higennoù gloazet gant ur saezhell, ma kaver mesket gwiennoù kaherel, gwad, drailhoù eskern ha dilhad.

chambre d'ionisation ◇ **ionization chamber** ◇ **kambr b. ionaat** Dinoer skinadoù ionaus en araez da vuzuliañ ar c'hementad tredan bezant en ion ganet gant tremen ar skinadoù dre un aezhenn.

chambre de brouillard ◇ **Wilson's cloud chamber** ◇ **kambr lusenn** Ardivink o lakaat war wel an ion ganet gant ur skinad dre ober dezho lenañ ouzh takennoù burezh o c'hlizhenniñ.

chambre de perfusion, chambre à cathéter implantable ◇ **implantable drug delivery system** ◇ **trevnad** *g.* **trefennañ ensteudadus** Kloezenn vihan ensteudet dindan amwiskadoù ar brusk, e kehent gant ur wazhienn dre ur c'hateer evit ober treuzskuilhadoù gwad pe trefennadoù yac'hadel, kalvezder arveret pa vez diounezet gwezheriadurioù hiramzer pe pa 'z eo bet euveret gwazhiennoù ar gouziviad gant ar sankadennoù kent.

chambre intervilleuse, lac sanguin maternel ◇ **intervillous space** ◇ **esaou** *g.* **etre-bodennou, lenn b. ar gwad mamm** Esaou gavaelet etre haen gorion ha haen diaz an dorzhienn, leun gant ar gwad mamm, soubet e hemañ bodennou ar c'horion, lec'h eskemm mamm-krouell.

chambre

- *chambre calorimétrique* kambr wrezventañ • *chambre de chasse* turva.

champ auditif ◇ **auditory field** ◇ **gavael** *g.* **kleved** Hollad ar stenioù, o zalm etre 13 ha 16 000 hertz, klevadus ent reol gant mab den; dindan an talm izek emañ an *isstenioù*, dreist an talm uc'hek emañ an *usstenioù*; evit pep talm e vez klevadusted ur sten e dalc'h e greñvder: dindan ur c'hreñvder izek emañ ar *stenioù anklevadus*, dreist ur c'hreñvder uc'hek emañ ar *stenioù laurus*.

champ de forces ◇ **forces field** ◇ **nerzhvaez** *g.* Egorenn ma wered nerzhoù, derc'hennet pep poent anezhi dre ur sturiadell anvet ivez nerzhvaez; e-keñver Mentawouriezh ez eo an nerzhvaez un nerzhder tolzel (atalad mentawouriel : $L T^{-2}$), eleze rannad un nerzh ($L M T^{-2}$) dre un tolz (M).

champ électrique ◇ **electric field** ◇ **tredanvaez** *g.* Nerzhvaez ganet gant tredanvec'hiadoù, dewerzhet peurliesañ dre voltou dre vetr; an tredanvaez en ur poent eus an egor zo dezhañ an un roud ha tu hag an nerzh o werediñ war nep bec'hiad tredan muiel loet er poent-se; e-keñver Mentawouriezh ez eo an tredanvaez rannad un nerzh (atalad mentawouriel : $L M T^{-2}$) dre un tredanad (Q), eleze $L M T^{-2} Q^{-1}$, pe $U L^{-1}$ er reizhiad Giorgi ma erlec'hier an atalad U ouzh atalad $L^2 M T^{-2} Q^{-1}$ an tredanvarr.

champ-gradient ◇ **gradient field** ◇ **dirivaez** *g.* Ergraf fizikel dedalvezet d'ar Vevedouriezh; er Rizehelloniezh, da geñver lankadoù kentañ an unandarzh, dasparzhadur war zigresk argammedek eus ar parennoù neuztarzhel adalek un annon.

champ magnétique ◇ **magnetic field** ◇ **gwarellvaez** *g.* Nerzhvaez ganet en dro d'ur warell pe d'un dredanreell, dewerzhet dre amperoù-tro dre vetr pe oerstedoù; atalad mentawouriel : $L^{-1} T^{-1} Q$ pe, er reizhiad Giorgi : $I L^{-1}$.

champ mésobranchial ◇ **mesobranchial area** ◇ **leur vezvrenkel** Rannbarzh ar rizehell loet a-gof etre ar yalc'hoù (pe ar boulc'hoù) brenkel, teir feilhenn ouzh e ober : ektoblastek, mezoblastek, endoblastek.

champ opératoire ◇ **1 operative field, operation area 2 drape** ◇ **1 maezienn b. oberata 2 amgeden b. -ioù** 1 Lodenn eus ar c'horf ma rener ur gwezh surjaniel. 2 Pezh lien, mezell, paper dishadenn arloet ouzh gorre pe e trobarzh ar vaezienn oberata.

champ visuel ◇ **field of vision, vision field, visual field** ◇ **gwelvaez** *g.* Ec'hongorn dec'havaelet gant ul lagad difiñv, astennet ent vonan 90° war ziavaez, 60° ouzh krec'h, 70° ouzh traoñ, 55° war ziabarzh — gwerzhadoù keitat, rak kemmoù bras e vez hervez an hiniennoù hag amveziadoù an imboure'h : gorread ar skramm, read al luc'h, liv ar steudenn, sked ar goueled, h.a.; keñverek eo pep poent eus ar gwelvaez d'ur poent savelet eus al luc'hsae ken ez eo imboure'hiñ ar gwelvaez kement hag imboure'hiñ arc'hwelel al luc'hsae.

champ visuel central ◇ **central vision field** ◇ **gwelvaez kreiz** Lodenn eus ar gwelvaez dindan 10° pe 20° diouzh ar poent studañ.

champ visuel périphérique ◇ **peripheral vision field** ◇ **gwelvaez trobarzh, gwelvaez tro** Lodenn eus ar gwelvaez dreist 10° pe 20° diouzh ar poent studañ.

champignonnistes : maladie des ~ ◇ **mushroom-worker's lung** ◇ **kleñved ar foueerion** Skeventad diwar zewentañ antigenoù bevel a orin struzhel a ve o tont eus aktinomiket termofil arvevat ouzh ar foue gounit.

champignons, mycètes ◇ **fungi, mycetes** ◇ **foue s., miket s.** Struzh kuzhadek eus skourrad an Tallofit (n'o devez na gwrizioù, na garenn, hogen un tall), ezvezant enno al livegennoù bevelaat, alese dre ret arvevat pe gelanat; e diarsell ar Gleñvedouriezh e pleder gant ar *mikromiket*, foue korrgreskerel kiriek da arvevadegezhioù (mikoziou), ha gant ar *makromiket* pe kebelle touseg, kontammus ul lod anezho.

chancre ◇ **chancre** ◇ **livant** *g.* Anaf kroc'hen pe glaourgenm oc'h azonañ kentennerad ur c'hleñved garvevel.

chancre blennorrhagique ◇ **gonorrhoeal chancre** ◇ **livant blennorrhagek, livant gonokokel** Teskad gouliezoù bihan ha direoliek o sezañ war an organoù genel, bezant a-wechoù e-kerz poread gonorreek ar vezenn hag ar veskenn pe ar c'hourzh hag ar gouin.

chancre lépreux ◇ **leprous chancre** ◇ **livant lovrezhel** Livant unek kroc'heneñ pe glaourgennel loet er poent enkoriñ, o chom alies erzerc'had nemetañ al lovrezh e-doug bloavezhioù.

chancre mou, chancre simple, chancrelle, chancroïde ◇ **chancroid, soft sore, venereal ulcer, venereal sore, ulcus molle, soft chancre** ◇ **livant meizh** Gouliez laurus, linus dec'hanet gant bazhell Ducrey.

chancre scabieux ◇ **scabious chancre** ◇ **livant hakrezel** Anaf tosigennek war vezenn klañvourion ganto an hakrez, kevret a-wechoù gant ul livant sifilitek.

chancre syphilitique ◇ **syphilitic chancre** ◇ **livant sifilitek** Livant o tarvezout teir sizhun peurliesañ goude an tredizhad poreüs, kevret gant ur c'hwarrenn amdriat; an arouez pennañ eo d'ar sifiliz kentael; an neuz klasel anezhañ zo ur graspad argalet, anlaur, ront, hep ribloù, o strilhañ dioutañ ul levruzenn a zizoloer enni dre an imbourc'h dreistkorrageskerel ar gwezher kiriek, an treponem; stummoù klinikel diseurt a zeskriver: livantoù angreizhek, breingedek, erorvanek; e-kichen al lec'h iadur ganadel klasel e stader livantoù an dro-fraezh, an huegou, ar c'hroc'h en.

chancre tuberculeux ◇ **tuberculous chancre** ◇ **livant torzhellek** Erzerc'had dibaot eus ar c'hentporead torzhellek, anezhañ ur c'houliez puilh enni ar bazhilli, kevret gant ur c'hwarrenn a-gendu.

CHAOS : syndrome ~ ◇ **CHAOS syndrome** ◇ **azoniad CHAOS** Gwreskanv diwar anvadoù saoznek un teskad anaезioù: *Coronary heart disease, Hypertension, hyperlipidaemia, Adult onset diabetes, Obesity, Stroke* (kalonnaoued kurunereel, uswask, gwadusvec'h lipid, diabet oadourel, borrdere, orc'had); anvad arveret da arouezañ ur steudad klañvadurioù amjestr da zespiñañ, a ve hilzsavelet.

chapelet costal, chapelet rachitique ◇ **rachitic rosary** ◇ **paterannoù l. (b.) brennid, paterannoù a 'l lec'h** Aridennad ozvennoù balirek en daou du d'ar glerenn, distummodoù eus ar c'henvelloù migorn-kostezenn diwar gleñved al lec'h.

chapelet scorbutique ◇ **scorbutic rosary** ◇ **paterannoù a 'r skorbut** Aridennad ozvennoù balirek en daou du d'ar glerenn da heul gwadliñvoù er c'henvelloù migorn-kostezenn diwar ar skorbut.

chaperon, chaperon moléculaire, protéine chaperon ◇ **chaperone, molecular chaperone, chaperone protein** ◇ **chaperon g. -où, chaperon molekulel, protéin g. chaperon, protéin mavek** Keal a Vevoniezh volekulel, protéin o tiogeliñ arc'hwelioù molekulel ar c'helligoù hep kemer perzh enno; ur roll o defe ar chapronoù evit parraat ouzh miarc'hwelioù kelligel naouus d'un niver bras a gleñvedoù (Parkinson, Alzheimer, korea Huntington, mukoviskidoz, h.a.).

charbon, maladie charbonneuse ◇ **anthrax, charbon** ◇ **serk g.** Pistriboread tredizhus ha hangaetüs start, enkoradus d'an dud ha d'al loened, devoudet gant *Bacteridium anthracis*; furm glinikel voasañ ar c'hleñved dibaot-se, micherel peurliesañ, treuzkaset dre an dedaoladoù loenel bet saotret gant ar spor, eo ar *vurbuenn yud*; furmoù all eo ar *gouliñv yud* hag ar *wadlestegzh serkel*, houmañ hep anaf notadus.

charbon activé ◇ **activated charcoal** ◇ **glaou g. blivaet** Glaou apotikel bet danzeet e doare da vuiaat e zesunsted; erskrivet da gentañ ouzh an aerlonk, en en arverer dreist holl da vezegañ pistriadurioù lemm, da skouer da heul euvradoù fonnek morfîn pe atropin.

Charcot : triade de ~ ◇ **Charcot's triad** ◇ **triad Charcot** Teskad tri azon gwehentus da zeznaou ar skleroz strewek: nistagmuz, kren diarvennel, deluzañ skoataet.

Charcot-Leyden : cristaux de ~ ◇ **Charcot-Leyden cristals** ◇ **strinkenoù Charcot-Leyden** Strinkenoù eizhtalek, heñvel ouzh nadozioù mor, a liv arwer, bet dizoloet gant Charcot e-barzh felc'h ha mel eskern ar leukemeion ha gant Leyden ebarzh skrouediadoù an astmateion, stadet ivez e-barzh kac'hadoù klañvourion an helmintiazou, desellet evel o tisoc'h diouzh distruj ar granulokit eozinofil.

Charcot-Marie : maladie de ~ ◇ **Charcot-Marie-Tooth disease, peroneal muscular atrophy** ◇ **kleñved Charcot-Marie** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek o teraouiñ er c'hrennoad, anezhañ dic'henezhadur pañsoù adreñv ha kelligoù kerniel arak ar mel alivenn, naouus en deroù dre isteñv ha seizi ar c'higennoù aspilhenn hag oc'h emastenn gorrek d'ar pevar ezel, kevret gant steuz an damougoù astirenn en tiriadoù diraezet.

charge tensionnelle ambulatoire ◇ **pressure load** ◇ **samm g. baleadel gwask ar gwad, samm ar gwask** Gwerzhad keitat ar gwask talmerel lerc'hwezet ent valeadel; ditouriñ a rafe an destrizh gwerc'hek o sammañ ar reizhiad kalongwazhiedel (sl. *MAPA*).

charge virale (plasmatique) ◇ **viral load** ◇ **samm viruz (er plasma)** Dewerzhadur an unvezioù viruz bezant er plasma, jedet dre vuzuliañ ar c'hementad DNA (eus viruz an avufo B) pe RNA (eus ar VIHAD); en dromañ diwezhañ e komzer a *samm izel* pa vez dindan 5 000 azeilad/mL, a *samm uhel* pa vez dreist 30 000; an dezverk gwellañ eo hiziv evit ditouriñ derez dasparañ ar viruz er bevedeg ha dre se dedroüsted ar c'hleñved.

charge : épreuve de ~, **test de tolérance** ◇ **tolerance test** ◇ **prouad bec'hiañ, prouad gougemer** Prouad arc'hwelel a zo e amkan studiañ kennevid un danvezenn goude diounit dre euvriñ pe dre sankañ un doenaed savelet anezhi; hervez an danvezenn diounezet e komzer eus *prouad ar glukozvec'hiañ* (Gl. *épreuve d'hyperglycémie provoquée*), *prouad ar fruktozvec'hiañ* (Gl. *épreuve de charge du fructose*), h.a..

charg-

- à la charge totale ou partielle de l'État e karg hollel pe darnel ar Stad • assurer la charge effective et permanente des enfants ensammañ bevadur gwerc'hek ha padek ar vugale • charge électrique bec'hiad tredan, tredanvec'hiad, tredanad, tredandolzid
- chargé de l'enseignement des sciences kefridiet da gelenn ar skiantoù • chargé de seconder le chef de service karget da eilañ ar penn rann • charger une bombe au cobalt kargañ un dolgenn gobalt • enfant à charge bugel e karg, bugel e bevadur, bugel bevadour • ions chargés positivement, négativement ion muivec'hiet, leivec'hiet • plaie, blessure par charge de plombs gouli, gloaz dre zrajez.

charlatan ◇ **quack** ◇ **krakvezeg, triakler** Den, gantañ an diplom mezeg pe get, o kinnig pareañ kleñvedoù 'zo dre araeziou hep diazez skiantel hag e-maez nep gwiriadur arnodel.

Charlin : syndrome de ~, syndrome du nerf nasal ◇ **Charlin's syndrome** ◇ **azoniad Charlin, azoniad an nervenn fri-saeoù** Barradoù nervost el lagad hag e kogn diabarzh ar malvennoù, daeraouiñ ha friver, a ve e dalc'h hegeuz an nervenn fri-saeoù pe kangrenn ar saeoù.

charnu

- bourgeons charnus, granulations (d'une plaie) tiñvennoù (ur gouli).

chasse : syndrome de ~ ◇ **dumping syndrome** ◇ **azoniad an tumpañ** Rouestlad d'ar c'hreuzezvenañ gant dasforzhañ kreuz-yunegenn, diwar ec'hoadur re herrek endalc'had ar skarvenn greuz e-barzh kilbleg kentañ an daouzegenn o c'hoarvezout e kerz ur pred gant ur gouziviad en e sav pe en e goazez; an azonou zo un diaez hollek, vaganelloù, gwridadoù, kalonask, rastrid, tolrern, a-wechoù koabrennegezh ha koempad.

chasse

- chasse biliaire ec'hoad bestl • chambre de chasse d'un ventricule rurva ur c'hofig.

chaud ◇ **hot** ◇ **tomm** aa. Adanv arveret da aroueziñ bezañs ur skinoberiegezh vras.

chaud : **laboratoire** ~ ◇ **hot laboratory** ◇ **imbourc'hva g. tomm** Imbourc'hva ma vez ur riskl skinaerezh diabarzh pe diavaez.

chaud : **nodule** ~ ◇ **hot node** ◇ **nozelell b. domm** Termen arveret er skingannluniñ da aroueziñ un nozelell o telenañ a-ziuz ar skinizotop (nozelell ar wagrenn skoed).

chaussure à tracteurs élastiques ◇ **shoe with dynamic assistant** ◇ **botez b. gant dewinterioù** Botez korfeunadel evit stourm ouzh ar rakkamm, marc'het outi daou sacher war zastenn stag ouzh he beg.

chaussure orthopédique ◇ **orthopaedic shoe** ◇ **botez korfeunadel** Botez oberiet diwar vuzul evit parraat ouzh distummadurioù an troad.

chaux sodée ◇ **soda lime** ◇ **soda-raz** Meskad hidrokسيدenn galkiom ha soda krign danvezet e stumm poultr pe greunigoù evit desunañ an diokسيدenn garbon e-barzh ar binviadur dieraezñ pe an trevnad imbourc'h arc'hwelel a 'n analerezh.

chef de clinique ◇ **penn klinik** 1 *Penn klinik skoriad a 'n ospitalioù (chef de clinique-assistant des hôpitaux)* : e Frañs, ezel eus koskor ar skol veur hag an ospitalioù tutaet a-douez an ezdiabarzhiaded ha karget da gelenn ar brantadourion war ar c'hlinik ha da glevout ouzh ar glañvourion dindan renerezh ar gelennerion; pep penn klinik zo war un dro skoriad a 'n ospitalioù. 2 *Prezour penn klinik (attaché chef de clinique)* : e Frañs, penn klinik hep karg ospitalel, na vez fiziet ennañ nemet kargoù skolveurel e-keñver ar studierion brantadour.

chef de muscle ◇ **head of muscle** ◇ **penn kigen** Eizhaenn nezek ur gigen, an eizhaenn bellek o c'hoarvezout eus ur stirenn ma kendurc'ha holl wiennoù ar gigen; deskrivañ a reer kigennoù dezho daou benn (*kigennoù daoubennek ar vrec'h* pe *ar vorzhed*), tri fenn (*kigennoù trifennek ar vrec'h*), pevar fenn (*kigen bevarfennek ar vorzhed*).

chef

- chef de service penn gwazrann, penn rann • médecin-chef pennvezeg.

cheilite ◇ **cheilitis** ◇ **gweuzfo g.** Anaf foel a 'n divweuz a orin allergek (ouzh ar ruz muzelloù), daraezel, heolel, porell, mikoze.

cheilite angulaire, perlèche, bridou ◇ **perleche, bridou, angular stomatitis** ◇ **gweuzfo ar freilhoù, tarle g.** Tizhad foel freilhoù an divweuz diwar hadennoù diseurt (ent klasel diwar strepokok), o pareañ dindan div pe deir sizhunvezh, tuet da adfeilhañ.

cheilite exfoliatrice, cheilite desquamatrice, desquamation persistante des lèvres ◇ **exfoliative cheilitis** ◇ **gweuzfo dispelius, gweuzfo gourc'hennus, gourc'hennad trebadek an divweuz** Gourc'hennad trouskennek eus lodenn greiz an divweuz, o padout hep arbenn anavezet, trezalc'het gant an dantikat.

cheilite fissuraire ◇ **commissural cheilitis** ◇ **gweuzfo skarrek** Seurtad gweuzfo garvevel pe foueel, naouus dre ur graspad skarrek en un pe en daou freilhoù, e stumm skamiloù bihan saezhennek, krac'hennou warno hag o wadañ aes.

cheilite glandulaire ◇ **glandular cheilitis** ◇ **gweuzfo gwagrennel** Uswe gwagrennoù halviñ allec'hiat loet e ribl rez ur weuz, ar weuz traoñ peurliesañ.

cheilite granulomateuse, macrocheilie granulomateuse ◇ **cheilitis granulomatosa** ◇ **gweuzfo granulomatus** Usteñv ganedigel an divweuz (keurweuzegezh) diwar limfangiom.

cheilochalasis ◇ **cheilochalasis** ◇ **gweuzusgad** g. Isteñv ha laoskted amwiskad an divweuz.

cheilophagie ◇ **cheilophagia** ◇ **gweuzdantañ** Skruz a ra d'ar gouziviad dantañ e zivweuz dizehañ.

cheioplastie ◇ **cheioplasty** ◇ **gweuzatelviñ** Dazluniañ surjaniel ur weuz enloezadec pe disneuziet da heul un daraez pe dre ur mizlid (boule'h), diwar-bouez un drailhenn groc'hen dezvenet anes pe abell (sl. *bec-de-lièvre*).

cheilorrhaphie ◇ **cheilorrhaphy** ◇ **1 gweuzdlita 2 genaouzlita** 1 Krafaelañ ur weuz bet faoutet dre ur gloazad. 2 Stankañ padennek faout ar genoù dre e grafaelañ en holl pe e darn.

cheiloscopie ◇ **cheiloscopia** ◇ **gweuzlouc'hseñ, gweuzsellñ** Imbourc'hiñ louc'h an divweuz.

cheiro-oral ◇ **dorngenaouel** aa. Oc'h angorzhañ ar genoù hag an dorn : *barrad dorngenaouel* (Gl. *crise cheiro-orale*), droukfell annonel oc'h erzerc'hañ dre varradoù loc'hadel en un dorn hag en ur c'hostez eus ar genoù ; *ledkammeraez dorngenaouel* (Gl. *hémiparésie cheiro-orale*), strafuilh ar santerezh en un dorn hag er c'hostez a-gendu eus ar genoù diwar un andag e barr adreñv talmerenn grenn an empenn.

cheiromégalie, chiromégalie ◇ **cheiromegaly** ◇ **daouarnusvent** g. Muiadur ec'honad an daouarn stadet er c'havnelad.

cheioplastie ◇ **cheioplasty** ◇ **dornatelviñ** Dazluniañ surjaniel amwiskadoù an dorn diwar-bouez drailhenoù dezvenet a-nes pe a-bell.

cheiropodal ◇ **cheiropodal** ◇ **dorntrodel** aa. Oc'h angorzhañ an dorn hag an troad.

chélate ◇ **chelate** ◇ **kelat** g. Molekul o tisoc'h eus un argerzh kelatañ.

chélateur ◇ **chelating agent** ◇ **kelater** g. **-ioù, kelatuzenn** b. Nep danvezenn en araez da c'henek kemplezhioù stabil gant kation liesamsavus (kalkiom, kouevr, plom ha metaloù ponner all); arveret er Yac'hadouriezh evit prederiañ pistriadurioù (dre ar plom dreist holl, ar bevargant, ar c'hrom, ar c'hobalt), stadoù 'zo a wadusvec'h kalkiom, an hemokromatoz, kleñved Wilson; gant ar metal bezant er bevedeg e c'han ar gelatuzenn ur gemplezh (ar c'helat) hezileizh, an-ionaet, anpistri hag ezvevennadus dre al louezh.

chéloïde ◇ **cheloid** ◇ **keloid** g. Yoc'henn groc'hen guñv a stumm hirvoan ha balirek gant astennadoù krabanvanek, kentael pe eilvedel d'un anaf, d'ur gleizenn peurliesañ.

chemin-

• *cheminement anormal de l'excitation* trehentad anreol ar broud, kammforzh ar broud • *faisceau cheminant à la partie externe du cordon postérieur* hordenn o tehenñ e lodenn diavaez ar pañs adreñv • *substance véhiculée, acheminée dans le sang vers le foie* danvezenn dehentet gant ar gwad trema an avu.

chémodectome ◇ **chemodectoma** ◇ **kemodektom** g. Seurtad paragangliom ankromlen.

chémorecepteur ◇ **chemoreceptor** ◇ **kimifraouva** g. Organ pe dachad korf kizidik ouzh danvezenoù kimiek 'zo.

chémosensibilité ◇ **chemosensitivity** ◇ **kimifraoudigezh** b. Kizidigezh fraouvaoù 'zo ouzh ar c'horfoù kimiek.

chémosis ◇ **chemosis** ◇ **kemoziz** g. Gouliñv eus kevresae al lagad dezhañ neuz un andell dreuzluc'hus roz pe ruz kel oc'h ogañ a-wechoù dre faout ar malvennoù, peurliesañ erzerc'had un danijenn danlec'hiet (lersaefo, pourc'hadfo, kahefo, behinfo ar pod lagad).

chérubinisme, chérubisme ◇ **cherubism** ◇ **keroubegezh** b. Miwe stirek askorn-migorn familhel ar barroù gaved o reiñ da fas ar bugel neuz un dremm geroub, dezhañ ur skinlun gaougistek, anaez kuñv o parañ gant ar gaezougezh.

chevauchement ◇ **overriding** ◇ **kevarlankañ** 1 A-zivout daou benn un askorn torret, an eil o riklañ a-dreuz hag o sankañ war c'horre egile. 2 A-zivout daou askorn kitem ar bugel, ribl an eil o sankañ war c'horre ribl egile da geñver ar gwilioud pa vez arstrizh lestr ar vamm (sl. *bipariétal : diamètre* ~).

cheveux ◇ **hair** n. & s. ◇ **blev s., briger s., gwaout** g. Faner neudenneheñvel, keratinaet, a liv kevarall eus un den d'egile, ensteudet er brigenn; er yezh resis e reer *briger*, *gwaout* eus blev ar brigenn.

cheveux en bambou, trichorrhexie invaginée, trichorrhexie noueuse ◇ **bamboo hair** ◇ **blev bambouz, blev koumbantek, blevfreg** g. **emouinadek** Briger moan, berr, sec'h, puzuilh, warno koumbantou dasparzhet dizingal ahed o garenn; ouzh ar c'horregresker e stader e c'hoarvez pep koumbant eus emouinadur lodenn bellek ar c'harenn e-barzh al lodenn nezek; steuziañ a ra hevelep direizh d'ar c'hrennoad, o lezel al lec'h gant briger reel.

cheve-

• *phanère implanté dans le cuir chevelu* faner ensteudet er brigenn.

cheville, articulation tibio-tarsienne ◇ **ankle, ankle joint** ◇ **ufern g., kenvell g. fer-gar, kenvell an ufern** Kenvell eus an ezel traoñ loet etre ar c'har hag an troad, naouus dre zaou valir, an ufern kostezel pe a-spilhenn hag an ufern kreizel pe a-skin; c'hoarvezout a ra, e krec'h, eus talbenn diavaez an ufern kreizel, talbenn diabarzh an ufern kostezel ha talbenn horzh ar skin, en traoñ, eus poleenn an askorn fer.

cheville

• *limitation chirurgicale des mouvements d'une articulation par utilisation d'une butée osseuse ou d'une cheville* bevennañ ent surjaniel fiñvoù ur c'henvell dre ur skurzell askorn pe un ibil.

chevillère ◇ **ankle support** ◇ **uferngenn** g. Steudell disloc'h an ufern.

Cheyne-Stokes : *respiration de* ~ ◇ **Cheyne-Stokes breathing** ◇ **analerezh g. Cheyne-Stokes** Rizh analgor naouus dre ur paouez analañ hir pe hiroc'h heuliet gant ur steudad analadoù war gresk o ampled hag ur steudad analadoù war zigresk oc'h echuiñ gant un harzanal nevez; strafuilh a hañval bezañ dec'h anet gant divig an eroueriañ e kreizennoù hirvel an analañ; stadet e vez peurliesañ da geñver ar skorted lounezh dibennel.

chez

• *cellules étrangères se multipliant chez le receveur* kelligoù allew o nerñ e-barzh ar c'hendouezer • *circulation croisée chez deux jumeaux* amred kroaziet etre daou c'hevell • *diabète induit chez l'animal* diabet dec'h anet war al loen • *manifestations organiques et psychiques survenant chez l'homme entre 50 et 70 ans* erzerc'hadou kreudel ha bredel o c'hoarvezout gant ar c'houved etre 50 ha 70 vloaz • *manifestations pathologiques déterminées chez l'homme par des parasites* erzerc'hadou kleñvedel dec'h anet en den gant arvevad.

Chiari-Frommel : *syndrome de* ~ ◇ **Chiari-Frommel syndrome** ◇ **azoniad Chiari-Frommel** Stad kleñvedel goude bec'h-iegi, anezhi kevret ur mizanliñv, ul laezhver aneskorvezhel hag un isteñv krozh-vierez; a-geñver e ve gant un direizh er gouzerc'hvel.

chiasma optique ◇ **optic chiasm** ◇ **gweltre g. ar gweled** Lavenn bevarc'hornek diadrez a steuñvenn wenn diwar groazigellañ ar gwiennoù o tont eus an nervennoù gweled hag o vont dre ar stiradoù gweled d'ar bluskenn gilpenn.

chiasmatisque : *syndrome* ~ ◇ **chiasmal syndrome** ◇ **azoniad ar gweltre** Ledangwel diunsko, ensko pe ezsko, kemparzhkek pe digemparzh, kevret a-wechoù gant un tizhad eus an nervenn weled, diwar un anaf e gweltre ar gweled, peurliesañ e dianlen ur yoc'henn, pe yoc'henn nes-dibr, pe yoc'henn ebarzh-dibr o fregañ kelc'hspourenn an dibr turkek, pe gliom ar gweltre.

chicane

• *interstice musculaire en forme de chicane* entremez kaherel hoskerek.

chien de fusil : *attitude, position en* ~ ◇ **coiled position** ◇ **emstumm g. rodellet** Emstumm devoudet gant tanaill ar pilhon (pilhono, gwadliñv ar pilhon), naouus dre an dargrezad war astenn eus ar penn hag ar c'hef hag an dargrezad war bleagañ eus an izili krec'h ha traoñ.

chiffre

• *les techniques de dosage automatique donnent des chiffres normaux de 0,65 à 1,10 g/l* ar c'halvezderioù dezventañ emgefreak a zegouezh gant gwerzhioù reol etre 0,65 hag 1,10 g/l • *nomenclature internationale désignant chaque facteur par un chiffre romain* destladur etrevroadel oc'h arouezñ pep parenn dre ur sifrenn roman.

chikungunya ◇ **chikungunya** ◇ **chikungunya g.** Seurtad deng bet dizoloet e 1954 e Tanganyika, diwar un alfaviruz eus kerentiad an *Togaviridae* treuzkaset gant moustiked eus ar genad *Aedes*; abaoe 2005, e Réunion, e c'hoarvez un darreuziad chikungunya diwar *Aedes albopictus*.

chimère ◇ **chimera** ◇ **kimera b.** Hinienn a zo parzhiat enni ur c'hread kelligoù allew gougermet ganti dre ma voe ebarzhet kent he gougenvezh hangaeñ; ur gimera a c'hell, da skouer, disoc'h eus un amred gwad kroaziet etre daou c'hevell allvi : tremen kentrat ar gwad etrezo e-doug ar rizehellvezh a zec'hano ur gougermet ouzh ar c'helligoù allew a gendalc'ho e se da nerñ e-barzh ar c'hendouezer.

chimio-embolisation ◇ **chemoembolization** ◇ **kimienfrouennañ** Kevrediñ ar c'himigurañ hag an enfrouennañ dre ebarzhiñ en amred talmerel korrgloranoù a zo enno al lia enepkankr.

chimiopallidectomie ◇ **chemopallidectomy** ◇ **kimilozeañ ar voullenn c'hlas, glaskimilozeañ** Distruj ar voullenn c'hlas (lodenn diabarzh ar gronn ferek) dre ensinklañ alkool enni, en amboaz prederiañ kleñved Parkinson.

chimioprophylaxie, chimioprévention ◇ **chemoprophylaxis** ◇ **kimiergurañ** Diounit gwezherioù kimiek evit gwareziñ hiniennoù yac'h en arvar un tredizhad (*kimiergurañ kentael*, Gl. *prophylaxie primaire*) pe evit dizarbenn ur poread klinikel gant gouziviaded tredizhet pe gant dougerion hadennoù (*kimiergurañ eilvedel*, Gl. *prophylaxie secondaire*).

chimiorésistance ◇ **drug-resistance** ◇ **kimiharzusted b.** Diouer gwered ar c'himigurañ.

chimiotactisme, chimiotaxie, chimiotropisme ◇ **chemotaxis** ◇ **kimidrevn g., kimidrevnegezh b.** Perzh gant ar protoplasm da vezañ dedennet (*kimidrevn yaek*) pe argaset (*kimidrevn nac'hek*) gant danvezennoù kimiek 'zo, an toksinoù garvevel pergen; aozerion 'zo a laka kemm etre ar c'himidrevn (Gl. *chimiotactisme, chimiotaxie*) da verkañ un dilec'hiañ hag ar c'himigerc'h (Gl. *chimio-tropisme*) da verkañ un durc'haat hep dilec'hiañ a-berzh ar bevion war-du pe diwar-du an danvezenn gimiek (sl. *cytotactique, cytotaxie*).

chimiotaxinomie, chimiotaxonomie ◇ **chemotaxonomy** ◇ **kimirummata** Rummata ar bakteri diwar elfennerezh ar c'hediadoù kimiek a ya d'ober ar goc'henn anezho pe ar gellig en he fezh.

chimiothérapie ◇ **chemotherapy** ◇ **kimigurañ** Mezegañ dre wezherioù kimiek, termen arveret e-keñver ar poreoù hag ar c'hankroù : *kimigurañ enepore, enepkankr*.

chimiotrophe ◇ **chemotrophic** ◇ **kimideñvek aa.** A-zivout bevion (loened, bakteri) a zo kimiek mammenn o gremm; hervez ma 'z eo maen pe vevel an danvez kennevidet, e lakaer kemm etre ar bevion kimivaendeñvek (Gl. *chimiolithotrophe*) hag ar bevion kimivev-deñvek (Gl. *chimioorganotrophe*); kimivevdeñvek eo ar bakteri kleñvedus.

chimisme stomacal ◇ **gastric chemistry** ◇ **kimiegezh b. kreuzel** Stad ar sug kreuz e diarsell e genaoc kimiek.

chimi-

• *catalyseur biochimique* trelusker bevgimiek • *cautérisation chimique* kimiezañ • *chimie pharmaceutique, pharmacie chimique* liagimiezh, liaerezh kimiek • *chimioorganotrophe* kimivevdeñvek • *chimiocautére* kimiezer • *chimiodépendance* kimioustoue • *chimiolithotrophe* kimivaendeñvek • *chimique, botanique, biologique* maenel, struzhel, loenel • *composés chimiques* kediadoù kimiek • *ère chimiothéra-pique* oadvezh ar c'himigurañ • *physicochimique* fizikel-kimiek.

chique, puce chique, puce des sables ◇ **chigoe, jigger, chigger, sand flea, Pulex penetrans** ◇ **turc'hwen** s. Afanpiet eus kerentiad ar *Sarkopsillideged*, seurtad c'hwen dezho un tal silhek ha javedoù hir dentigaouet munut, a vez ar parezed anezho, ur wech speriet, o sankañ e-barzh kroc'hen an dud hag al loened gouez pe zoñv, o tevoudañ un anaez kuñv peurliesañ, ar *sarkopsilloz* pe *tungoz*.

chiralgie ◇ **chiralgia** ◇ **dornost** b. Laur en dorn.

chiralgie paresthésique ◇ **chiralgia paresthetica** ◇ **dornost kammeraezel** Azoniad naouus dre ar wiridigezh ouzh ar gwask en dorn; leteñvel ouzh ar *gwrilaur kammeraezel* (sl. *méralgie paresthésique*).

chiralité ◇ **chirality** ◇ **eskidelezh** b. Perzh div ergorenn (div volekulenn) a zo an eil skeudenn velezour eben.

chiropraxie ◇ **ch(e)iropractic, ch(e)iropraxis** ◇ **kiropaksiezh** b., **treleuñviñ, treleuñverezh** g. Hentenn yac'haat kantouziat soliet war an arlakadenn e vez pareadus un niver anaezioù diwar-bouez darfiñverezh ar mellennoù.

chirurgie ◇ **surgery** ◇ **Surjianerezh** g. Rann eus ar Yac'hadouriezh o c'hoarvezout a gefleuñvadoù diavaez hag a wezhiadennoù trewan (gwadek); ar surjianerezh n'eo deuet da vezañ un diskiblezh hiniennek nemet gant an dieraeziñ hag an dilestañ; diaes ouzh diaes eo avat tresañ bevennoù etre Mezekniezh diabarzh ha Surjianerezh : da gentañ pa ampleg an deznaouiñ surjaniel an amoug eus an arbennigiezhoù mezegel, d'an eil pa 'z a ar Vezekniezh diabarzh war galvezekaat hag o c'houlenn gwezhioù kemplezh ouzh kemplezh a vez alies a natur surjaniel.

chirurgie esthétique ◇ **cosmetic surgery** ◇ **Surjianerezh gwelzeladel, Surjianerezh heneuziañ** Skourr eus ar Surjianerezh atelviñ o plediñ da zereizhañ neuzioù ar c'horf.

chirurgie plastique ◇ **plastic surgery** ◇ **Surjianerezh atelviñ** Rann eus ar Surjianerezh gouestlet da zereizhañ gwariadoù an diorren, siou ar wiadezh pe an trolinennoù, distummadurioù ar c'horf diwar an oad, daou zurc'hadur dezhañ : ar *Surjianerezh dereizhañ* (Gl. *chirurgie correctrice*), ar *Surjianerezh dazluniañ* (Gl. *chirurgie reconstructive*).

chir-

• *chiropracteur, chiropractor, chiropraticien* kiropaktor, treleuñver, treleuñvour • *chirurgical* surjaniel • *chirurgie ambulatoire* Surjianerezh baleadel • *chirurgie cardiaque* Surjianerezh ar galon, Kalonsurjianerezh • *chirurgie dentaire* Surjianerezh an dent, Dentsurjianerezh • *chirurgie générale* Surjianerezh hollek • *chirurgie radicale* surjianerezh peurbareat • *chirurgie réfractive* Surjianerezh ar gouskogañ • *chirurgien* surjian • *neurochirurgie* Nervsurjianerezh • *non proprement chirurgical* amsurjaniel • *psychochirurgie* Bredsurjianerezh.

Chlamydia ◇ **Chlamydia** ◇ **Chlamydia** g., **klamid** s. (-enn b.) Genad garvevion eus kerentiad ar c'hlamidiakeged, gantañ naouusteroù ar bakteri hag ar viruzoù, gougevret outañ ar spesadoù *Chlamydia trachomatis*, gwezher an trakom, *Chlamydia psittaci*, gwezher ar psitakoz, an ornitoz ha kleñvedoù loenel niverus, *Chlamydia pneumoniae*, gwezher kleñvedoù analadel; anezho hadennoù hedizh d'ar bevastaleroù (*kiklineier*).

chloasma, tache pigmentaire de la peau ◇ **chloasma, moth** ◇ **kloasma** g., **gourlivegad** g. Livegad gell, direoleik, kemparzhkek, o nodiñ en dro d'ar podoù lagad, war an tal hag an daouividig a-bell diouzh ar brigenn, azonus da anaezioù diseurt (amwad grevus, strafuillhoù ganadel), e dianlen an diouint estroprogestativoù kevret gant ar dizhad an heol, met dreist holl e dalc'h ar vrazedded (*gweenn ar vrazedded*, Gl. *masque de la grossesse*, Sz. *mask of pregnancy*).

chloracné ◇ **chloracne, chlorine acne** ◇ **klorakne** b. Akne eilvedel da ar dizhad an aozadoù kloret.

chloral, hydrate de chloral ◇ **chloral hydrate** ◇ **kloral** g., **hidrat** g. **kloral** Aldehidenn a ziounezed en 19t hag 20t kantved evel huneiad.

chloration ◇ **chlorination** ◇ **klorañ** 1 Araezad dishadennañ dour kêr dre azdodiñ outañ klor aezhenn pe liñvenn pe hipoklorit natriom (*javellañ*) diouzh feurioù azas evit chom hep darallañ ar perzhioù merzhadennel anezhañ. 2 Azdodiñ klor ouzh an dourioù skarzh war-benn o dilouezañ a-raok o disteurel er stêr.

chlorémie ◇ **chloraemia** ◇ **klorwadvec'h** g. Feur an ion klor er gwad; kemm a lakaer etre ar *c'hlorwadvec'h plasma* (100-109 mmol/l) hag ar *c'hlorwadvec'h hemati* (52 mmol/l).

chlorhydrie ◇ **chlorhydria** ◇ **klorhidregezh** b. Sammad ar c'hementadoù trenkenn glordhidrek bezant er sug kreuz ken digraf, ken kengrafet ouzh ar mukoproteinoù, dewerzhed da geñver prouad ar *pred imbourc'h* (Gl. *repas d'épreuve*).

chloroformisation ◇ **chloroformization** ◇ **kloroformiñ** g. Dieraeziñ dre ar c'hloroform, aozad aezhidik aet diarver hiziv en askont d'e bistrigezh.

chlorome, cancer vert d'Aran ◇ **chloroma** ◇ **klorom** g. Hanwe o tizhout ar vugale, naouus dre nozeleñnoù limfatek arwer war an eskern plat (ar c'hlopenn pergen) hag ar flugez, hag ul leukemiezh lemm mieloblastek, marvus dindan un nebeut mizioù.

chloronychie ◇ **gwerivin** g. Livrezh gwer un ivin.

chloropénie ◇ **chloropenia** ◇ **klorisvec'h** g., **olklor** g. Leiadur ar feur klor hag ar c'hloridennoù e dourennoù ar bevedeg, peurgetket er gwadvez hag el liñvenn benn-kein.

chloropexie ◇ **chloropexia** ◇ **klorlenañ** Stagañ ar c'hlor hag ar c'hloridennoù ouzh ar gwiadoù.

chloropie ◇ **chloropsia** ◇ **gwerarnewel** *g.* Seurtad arnewel a ra merzhout un arliv gwer war an traoù.

chlorose ◇ **chlorosis** ◇ **kloroz** *g.* Anvad dispredet a aroueze amwad olhouarnel ar merc'hed yaouank.

chlorurachie ◇ ◇ **1 keingloregezh** *b.* **2 klorgeinvec'h** *g.* 1 Bezañs klor ha kloridennoù el liñvenn benn-kein. 2 Feur klor ha kloridennoù el liñvenn benn-kein.

chlorure de sodium ◇ **sodium chloride** ◇ **kloridenn** *b.* **natriom** Hal diwar gediañ an drenkenn glordred hag an natriom (NaCl), bezant en holen mor hag en holen maen, kedrann eus gwiadoù ar bevion.

chlorurémie ◇ **chloruraemia** ◇ **gwadkloridegezh** *b.* Bezañs vonan kloridennoù (natriom pergen) er gwad.

chlorurie ◇ **chloruria** ◇ **1 2 troazhkloridegezh** *b.* **3 troazhvec'h kloridennoù** 1 Bezañs vonan kloridennoù (natriom pergen) en troazh. 2 Kementad kloridennoù bezant en troazh ezvorc'h, bonan etre 12 ha 14 g dre 24 h. 3 Feur kloridennoù en troazh.

choanes ◇ **choanae** ◇ **founilhoù** *l.* (*g.*) Digoroù adrefiv kavenn ar fri ouzh he lakaat kehent gant ar fric'hargadenn.

choc, état de choc ◇ **shock** ◇ **bleuz** *g.* Azoniad klinikel a-geñver gant divig lemm amred ar gwad, o tisoc'h gant an isvec'h oksigen er gwiadoù, ar morgud, an asikted, yenaat an eizhaennoù, an iswrester, ar poulz bihan hag herrek, an isvorc'h troazh ha koemp ar gwask talmerel; div wikefre a zeskriver d'ar bleuz : *1)* pe *bleuz gwadisventel*, gant leiad trumm an distro gwazhiennel *a)* dre zigresk tolz ar gwad amredat (gwadliñv, daraez, devad, oberatadenn), *b)* dre zourisvec'hiañ lemm ha koll natriom (darc'hoal, c'hweladoù puilh, kleñved Addison pe akidoz diabetel), *c)* dre wazhiedfrankaat holle (bleuz darwalladel, damougel, pristriadel, poreel, gwadvakteriel), *2)* pe *bleuz kalonien*, gant skorted lemm leuniadur ar galon e dalc'h *a)* ur c'houchadur, *b)* un ustead muiiek, *c)* un angwazhiad, *d)* ur c'halongaherfo, *e)* un enfrou skevent bloc'hek, *f)* un isvoll aortek ha mintrek strizh.

choc allergénique ◇ **allergenic shock** ◇ **bleuz allergenel** Bleuz darwalladel devoudet gant ensinkladur an allergen spesadel da geñver ur prouad deznaouiñ pe ur gur digizidikaat.

choc anaphylactique ◇ **anaphylactic shock** ◇ **bleuz darwalladel, darwallad** *g.* Bleuz o c'hoarvezout trumm un nebeut munudoù goude ensinkladur un antigen ez eo bet ar gouziviad kizidikaet outañ dre berzh un ensinkladur diagent, da azonou dezhañ debtron hollek, gwelvded, enkreuz, yenaat, koma; er furmoù skañvoc'h e stader gouliñvoù kroc'henglaourgenn, linadell, paz, trec'hwezh astmavane; gwikefre ar bleuz darwalladel eo an dazgwered hangaele etre an antigen hag an antikorf gwadveizel spesadel (*reagin*) bezant war ar c'helligoù bazofil, a ra d'ar re-mañ dilaoskiñ hanteradoù kimiek gwazhiedfrankaer, an hini pennañ anezho o vezañ an *histamin*.

choc astragalien ◇ ◇ **tos g. ar fer** Santadur ur stok hag un harz pa laka an imbourc'her treñv an troad da riklañ war dreuz en ur zerc'hel ar c'har difiñv : an azon eo eus diempradur gevel an ufern dre un torr (sl. *ballotement du pied : signe du ~*).

choc bactériémique, choc infectieux, choc septique ◇ **bactériaemic shock, septic shock** ◇ **bleuz gwadvakteriek, bleuz poreel, bleuz lestel** Skorted lemm an amred gwad devoudet gant ur poread, dreist holl diwar hadennoù Gram –; bleuz o teraouiñ dre ur griidienn hag ur renn terzhienn uhel ha trumm.

choc compensé ◇ **compensated shock** ◇ **bleuz kevassavet** Bleuz ma chom hogos reol ar gwask talmerel hag an eroueriadur gwad trobarzhel bennozh d'an ustead kalon ha d'ar gwazhiedstrishaat trobarzhel.

choc d'origine vasculaire ◇ **circulatory shock** ◇ **bleuz frankael** Bleuz naouus dre ur c'hoempad diwar ur gwazhiedfrankaat trumm ha muiiek : goude un daraez, e kerz poreoù 'zo (tifoid), un darwallad, h.a.

choc de pointe ◇ **apex tap** ◇ **tos ar gern** Santadur poentek, a-gorvez gant ar poulz, merzhet gant an dorn harpet ouzh rannbarzh kostezel araok kleiz ar bruski, o klotañ gant horos kern ar galon da geñver ar sistol.

choc électrique ◇ **electric shock** ◇ **tredansak** *g.* Hentenn arveret da brederiañ migorveziou kalon 'zo, anezhi diskargañ ur bec'hiad tredan e-doug un amzer verr tre a-dreuz d'ar bruski.

choc en dôme ◇ **choc en dôme** ◇ **tos war gouc'h** Stumm a vez gant tos ar gern da geñver usvent ar c'hofig kleiz, heñvel ouzh santadur ur voull o koeñviñ er voz.

choc en retour ◇ **back stroke** ◇ **astos** *g.* Santadur ouzh bizied an imbourc'her o teuta ar grozh vec'hiek pa zistro da horosiñ outo blein ar grouell o doa pouezet warnañ (sl. *ballotement fetal*).

choc opératoire ◇ **surgical shock** ◇ **bleuz oberatael, bleuz surjaniel** Bleuz o c'hoarvezout e kerz un oberatadenn surjaniel, diwar hirbad ar gwezh, ar c'holl gwad, an digempouez dourennel, disfreq ar gwiadoù.

choc rotulien ◇ **patella impact** ◇ **tos ar padelleg** Santadur ur stok merzhet gant biz an imbourc'her pa bouez trumm war dalbenn araok ar padelleg, an askorn-mañ o vont da skeiñ ouzh an askorn morzhed, o lakaat erzerc'h ur fennad liñvenn er glin.

choc tibial ◇ ◇ **tos ar skin** Santadur ur stok diwar genskeiñ talbennoù kenvellañ an askorn morzhed hag ar skin da geñver fiñvoù nesaat-pellaat ar c'har war ar vorzhed, oc'h erzerc'haat rogad stagelloù kengostezel ar glin.

choc toxique, choc toxique staphylococcique ◇ **toxic shock syndrome** ◇ **bleuz pistriel, bleuz pistriel stafilokokel** Bleuz gwresterek kevret gant eritroderma skarlegvanel ha tizhadoù grevus ar pugnez, dec'hanet gant un toksin stafilokokel.

choc

- *choc aérien, blessure par souffle, blast injury* aerstroñsad, boskanafad, fuc'hanafad
- *choc anaphylatoxinique* bleuz darwallvanel
- *choc cardiogénique à la suite d'une intervention de chirurgie cardiaque* bleuz kalonien da heul ur gwezh surjaniel war ar galon

• *choc de la pointe du cœur* horos kern ar galon • *choc hypo-volémique* bleuz gwadisventel • *choc réversible* bleuz eiltroüs • *dû au choc des surfaces articulaires* diwar genskeñ an talbennoù kenvellañ.

cholagogue ◇ **cholagogue** ◇ **1 bestlec'holus** aa. **2 bestlec'holuzenn** b. -où 1 O tevoudañ karzhadur ar forzhioù bestl. 2 Danvezenn vestlec'holus.

cholémie ◇ **cholaemia** ◇ **gwadvec'h** g. **bestlhalioù** Feur an halioù bestl er plasma, ent vonan dindan 4 mg/l, o sevel pa vez bestlanred pe kelligloez avu.

cholarurie ◇ **choluria** ◇ **1 bestlhalegezh** b. **troazh, troazhvestlhalegezh** b. **2 troazhvec'h** g. **bestlhalioù** 1 Bezañs haliou halioù bestl en troazh. 2 Feur an halioù bestl en troazh.

cholangiectasie ◇ **cholangiectasy** ◇ **forzhusvoll** g. **bestl, bestlforzhusvoll** g. Bolc'hadur ar forzhioù bestl.

cholangiocarcinome ◇ **cholangiocarcinoma** ◇ **kolangiokarkinom** g. Yoc'henn yud evodet diwar epitelienn ar forzhioù bestl enavuel.

cholangiocystostomie ◇ **cholangiocystostomy** ◇ **bestlgellennadforzhañ** Skarvañ surjaniel forzhioù bestl ouzh speur grec'h ar gellenn vestl, pa vez steviet san voutin an avu.

cholangio-entérostomie ◇ **cholangioenterostomy** ◇ **bestladforzhañ er pervez** Skarvañ surjaniel ar forzhioù bestl ouzh ar pervez.

cholangiographie, angiocholégraphie, biligraphie, cholégraphie ◇ **cholangiography** ◇ **bestlforzhluniñ, bestlluniñ** Skin-luniñ ar forzhioù bestl goude ensinklañ an aozad skindemer dre ar wazhienn.

cholangiole, passage de Hering, canal de Hering ◇ **Hering's canal** ◇ **forzh** b. **Hering** Kanol verr o keneren ur ganolig vestl hag ur ganol etreflizepel.

cholangiolite ◇ **cholangiolitis** ◇ **heringfo** g., **kolangiolit** g. Fo ar c'hanolioù etreflizepel o c'hoarvezout da geñver ar c'hirroz bestlel kentael pe ikterou pistriel 'zo.

cholangiome ◇ **cholangioma** ◇ **kolangiom** g. Nevezwe kuñv parenkim an avu evodet diwar ar c'hanoligoù bestl.

cholangio-RM ◇ **magnetic resonance cholangiography** ◇ **bestlerluniñ gwarellel, gwarellvestlerluniñ** Erc'hwiliañ antrewan ar forzhioù bestl dre ar skeudennerezh dre zasson gwarellel gant pe peurliesañ hep ur gwezher dargemm kewarellek.

cholangioscopie ◇ **cholangioscopy** ◇ **bestlforzhengweliñ, bestlengweliñ** Erc'hwiliañ ar forzhioù bestl diwar-bouez ar c'holedoskop, endoskop arbennik ebarzhet antrewan a-gilred pe dre vestsanenbenañ diawezh.

cholangiostomie ◇ **cholangiostomy** ◇ **bestlezforzhañ** Skarvañ ur forzh vestl ouzh ar c'hroc'hen, oberatadenn graet pa vez steviet diremed ar san vestl ha san voutin an avu.

cholangiotomie ◇ **cholangiotomy** ◇ **bestlforzhenbenañ** Digeriñ surjaniel ur forzh vestl.

cholangite ◇ **cholangitis** ◇ **bestlforzho** g. Tanijenn ar forzhioù bestl.

cholangite diffuse non oblitérante de Rössle ◇ **bestlforzho strewek anstevius Rössle** Tanijenn strewek ar forzhioù bestl ec'havuel hep steviadur, o c'hoarvezout e-kerz ur poradur pervez pe dedro un angreizh koazhadel.

cholangite primitive sclérosante ◇ **primary sclerosing cholangitis** ◇ **bestlforzho kentael sklerozus** Tanijenn ha fibroz ar forzhioù bestl o tizhout ar gourev goude 30 vloaz, o tevoudañ tamm ha tamm an anvoll anezho hag ar bestlanred; dianav e arbenn, alies e c'hoarvez kevret gant ur c'holonfo angreizhek, kleñved Crohn pe ur c'holangiokarkinom.

cholécalficérol ◇ **cholecalciferol** ◇ **kolekalkiferol** g. Vitamin D₁ enaozet e-barzh an derm dindan wered ar skinad dreistmouk B; treuzfurmet gant an avu e *kalkidiol* ha, da heul, gant al lounezh e *kalkitriol*, oc'h aesaat sugadur koazhadel ar c'halkiom hag o skoilhañ ouzh enaoz ar parathormon.

cholécystalgie ◇ **cholecystalgia** ◇ **bestlgellennost** b. Laur er gellenn vestl.

cholécystatonie, maladie de Chiray et Pavel ◇ **cholecystatony** ◇ **bestlgellennantant** g. Antant ar gellenn vestl o tevoudañ an dardennañ anezhi ha naous dre ur wiridigezh lec'hel, strafuilhoù ar c'hoaz-hañ, kernadoù ha treutadur.

cholécystectasie ◇ **cholecystectasia** ◇ **bestlgellennusvoll** g. Dardennadur ar gellenn vestl.

cholécystectomie ◇ **cholecystectomy** ◇ **bestlgellennezvenañ** Dilemel surjaniel ar gellenn vestl.

cholécystite ◇ **cholecystitis** ◇ **bestlgellennfo** g. Tanijenn ar gellenn vestl.

cholécystocinétique, cholécystokinétique ◇ **cholecystokinetic** ◇ **bestlgellennvivaus** aa. O kevaraezañ argrezadur ar gellenn vestl, digoridigezh kelc'hstrishaer Oddi ha, da heul, karzhadur ar vestl trema ar pervez.

cholécystocolostomie ◇ **cholecystocolostomy** ◇ **bestlgellennadforzhañ er c'holon** Skarvañ surjaniel ar gellenn vestl ouzh ar c'holon.

cholécystoduodénostomie ◇ **cholecystoduodenostomy** ◇ **bestlgellennadforzhañ en daouzegenn** Skarvañ surjaniel ar gellenn vestl ouzh an daouzegenn.

cholécystogastrostomie ◇ **cholecystogastrostomy** ◇ **bestlgellennadforzhañ er c'hreuz** Skarvañ surjaniel ar gellenn vestl ouzh ar stomok.

- cholécystographie** ◇ **cholecystography** ◇ **bestgellennluniñ** Skinluniñ ar gellenn vestl goude ensinklañ pe ober euvriñ un iodaozad dargemm, mod imboure'hiñ dilezet hiziv e gounid ar stenerluniñ.
- cholécystojéjunostomie** ◇ **cholecystojejunostomy** ◇ **bestgellennadforzhañ er yunegenn** Skarvañ surjaniel ar gellenn vestl ouzh ar yunegenn.
- cholécystokinine** ◇ **cholecystokinin** ◇ **kolekistokinin** g. Hormon polipeptidek borc'het gant glaourgenn an daouzegenn diwar wered trenkennoù ha druzennoù ar c'hir koazhadel, o tevoudañ argrezadur ar stomok, ar gellenn vestl hag ar pervez hag o kentraouiñ borc'hadur ar vestl hag enzimoù an ilgreiz.
- cholécystopathie** ◇ **cholecystopathy** ◇ **bestgellennanaez** g. Anvad genadel klañvadurioù ar gellenn vestl.
- cholécystopexie** ◇ **cholecystopexy** ◇ **bestgellennAanlenañ** Stagañ surjaniel ar gellenn vestl ouzh speur ar c'hof.
- cholécystorrhaphie** ◇ **cholecystorrhaphy** ◇ **bestgellenn dlita** Krafaelañ ur gouli (oberatael pe get) eus ar gellenn vestl.
- cholécystostomie** ◇ **cholecystostomy** ◇ **bestgellennezforzhañ** Digeriñ surjaniel ar gellenn vestl ha krafaelañ brielloù ar flañchad ouzh brielloù flañchad kroc'hen ar c'hof.
- cholécystotomie** ◇ **cholecystotomy** ◇ **bestgellennenbenañ** Digeriñ surjaniel ar gellenn vestl evit digarzhañ al lin pe ar grouan a zo enni.
- cholédochoduodénostomie** ◇ **choledochoduodenostomy** ◇ **bestlsanadforzhañ en daouzegenn** Skarvañ ar san vestl ouzh an daouzegenn.
- cholédocho-entérostomie** ◇ **choledochointerostomy** ◇ **bestlsanadforzhañ er pervez** Skarvañ ar san vestl ouzh ar pervez, penn-ouzh-tu pe tu-ouzh-tu.
- cholédochofibroscopie** ◇ **choledochofibroscoy** ◇ **bestlsanluc'hwereañ** Erc'hwiliañ ar san vestl diwar-bouez ur fibroskop.
- cholédochographie** ◇ **choledochography** ◇ **bestlsanluniñ** Skinluniñ ar san vestl goude ensinklañ er wazhienn un iodaozad dargemm.
- cholédocholithiase** ◇ **choledocholithiasis** ◇ **grouanegezh b. ar san vestl, bestlsanc'hrouanegezh b.** Bezañs grouan er san vestl.
- cholédochoplastie** ◇ **choledochoplasty** ◇ **bestlsanatelviñ** Asparañ ar san vestl goude dazbidañ an tamm strishaet anezhi.
- cholédochostomie** ◇ **choledochostomy** ◇ **bestlsanezforzhañ** Distreugañ ar vestl d'an diavaez diwar-bouez ur wehennell badennek sanket er san vestl (*gwehennell Kehr*).
- cholédochotomie** ◇ **choledochotomy** ◇ **bestlsanenbenañ** Digeriñ surjaniel ar san vestl evit eztennañ ar grouan a zo enni pe evit distreugañ ar vestl trema an diavaez.
- cholédocite** ◇ **choledocitis** ◇ **bestlsanfo** g. Tanijenn ar san vestl.
- cholédoque** : **conduit** ~, **canal** ~ ◇ **bile duct** ◇ **san b. vestl** Rann dibenn forzh degorzhañ ar vestl, o tisoc'h eus kember san voutin an avu ha san ar gellenn, o tifourkañ e lodenn a-ziskenn an daouzegenn war eun pe dre hantererezh ar gloestr avu-ilgreiz.
- cholélithe** ◇ **cholelith** ◇ **bestlvaen** g. (l. : **bestlvein**) Grouanenn vestlel, fetisaenn, anezhi pe kolesterol (ouzhpenn 60 %), Xandemer, pe livegennoù (bilirubinatkalkiom, peurliesañ en argrec'h un isvoll), pe karbonat kalkiom, pe kemmesk (enni kolesterol, livegennoù ha halioù kalkiom a genfeurioù diseurt).
- cholélithiase** ◇ **cholelithiasis** ◇ **grouanegezh b. vestlel, bestlc'hrouanegezh b.** Bezañs grouan er forzhioù pe er gellenn vestl.
- cholélitholyse** ◇ **cholelitholysis** ◇ **bestlvaenloezañ** Distrujañ ar grouan bestlel.
- cholélitholytique** ◇ **cholelitholytic** ◇ **1 bestlvaenloezus aa. 2 bestlvaenloezer** g. **-ioù** 1 En araez da zistrujañ ar grouan bestlel. 2 Lia en araez da zileizhiñ grouan bestlel 'zo.
- cholélithotripsie, cholélithotritie** ◇ **cholelithotripsy** ◇ **bestlvaenfrikañ** Breviñ grouan er forzhioù bestl, oberatadenn surjaniel gwechall, hiziv renet a-ziavaez dindan luc'hwereañ antrewan.
- cholémie** ◇ **cholaemia** ◇ **gwadvestlegezh b.** Bezañs elfennoù eus ar vestl er gwad : livegennoù, kolesterol, halioù.
- cholémie familiale, maladie de Gilbert** ◇ **familial cholaemia, Gilbert's disease** ◇ **gwadvestlegezh familhel, kleñved Gilbert** Migennevid livegennoù ar vestl treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, naouus ent vevoniell dre ur gwadusvec'h bulirubin, ent klinikel dre ur gouikter henek diwar un ezreolder e keveiladur ar bilirubin gant an drenkenn c'hlikuronek en diouer eus enzimoù avuel 'zo.
- cholémogramme** ◇ **gwadvec'hieg b. vestlel** Disoc'h an dezventañ livegennoù, kolesterol, halioù ar vestl bezant er gwad.
- cholépathie** ◇ **cholepathia** ◇ **bestlanaez** g. Nep klañvadur eus ar forzhioù bestl.
- cholépéritoine** ◇ **choleperitoneum** ◇ **ampelennvestlad g., torvestlad** g. Fennad bestl e kavenn an ampelenn, a-zarvoud (da geñver un oberatadenn, dre c'hloazadur ar gellenn vestl), pe emdarzh (da heul fregad ur c'hist hidatek, pe fregad ar gellenn vestl breingedet).
- choléra, choléra asiatique** ◇ **cholera** ◇ **kolera** g., **kolera aziat** Pistriboread denel strizh, tredizhus kenan dre an dour hag ar stekiñ eun pe ameeun, devoudet gant ar *vibron kolerek* (hadenn dizoloet gant Koch e 1883), da azonoù dezhañ un darc'hoal

puilh ha c'hweladurioù o tec'han kolloù dourkevionel bras, glazoù, iswrester, antroazh ha koempad ; er furmoù grevus e pad an dedro marvus etre 12 ha 36 eurvezh.

choléra infantile, entérite cholériforme ◇ **cholera infantum** ◇ **pervezfo g. koleravane** Pore ar vabaned naouus dre un danijenn goazhadel, c'hweladurioù, darc'hoal, un दौरisvec'h muiek, marvus peurliesañ.

choléra nostras, choléra anglais, choléra européen, choléra morbus ◇ **cholera nostras** ◇ **cholera europat, cholera nostras** Kleñved skignek peurliesañ o tarvezout en Europa en dibenn hañv, heñvel dre e azonoù ouzh ar c'holera aziat, nemet ned eo ket tredizhus ha ne gaver ket vibriion Koch en oulennoù ; ur *Salmonella* e ve an hadenn giriek.

choléra sec ◇ **dry cholera** ◇ **kolera sec'h** Furm golera ma tarvez ar marv dre goempad a-raok d'an azonoù koazhadel anadiñ.

cholérèse ◇ **choleresis** ◇ **bestlañ** Borc'hañ ha degorzhañ ar vestl.

cholérétique ◇ **choleric** ◇ **1 bestlus aa. 2 bestluzenn b.** 1 O tevoudañ pe o kevaraezañ ar bestlañ. 2 danvezenn vestlus.

cholériforme ◇ **cholericform** ◇ **koleravane** aa. A-zivout un anaez a zo heñvel e azonoù ouzh re ar c'holera ; en devoud, ar stadoù ma vez kevredet un darc'hoal puilh hag un दौरisvec'h muiek.

cholestase, cholestase ◇ **cholestasis** ◇ **bestlanred g.** Leiad pe arsav ar red bestl ; hervez an arbenn anezhañ e lakaer kemm etre : ar *bestlanred ec'havuel* (Gl. *cholestase extrahépatique*), klok peurliesañ hag ikterek, diwar steviad ar forzhioù bestl ec'h-avuel, ar *bestlanred diglok* pe *bestlisred*, anikterek (Gl. *cholestase incomplète, anictérique*), ar *bestlanred enavuel* (Gl. *cholestase intrahépatique*) devoudet pe gant steviadur ar forzhioù bestl enavuel, pe gant paouez ar borc'had bestl (*bestlanvorc'h*) e dianlen un tizhad eus an avugelligoù, darnel peurliesañ.

cholestase récurrente bénigne ◇ **benign familial recurrent cholestasis** ◇ **bestlanred arreadek kuñv** Anaez dibaot o tarvezout adalek ar vugeliezh hag o tizhout ar baotred dreist holl, dianav e orin ha kuñv e zedro, naouus dre resmiadoù arreat a vestlanred enavuel ikterek.

cholestérol ◇ **cholesterol** ◇ **kolesterol g.** Seurtad sterol bezant e gwiadoù hag e liñvennoù ar bevedeg, ezdeuat (bouedel) evit un darn, endeuat (enaozet en avu) evit an darn all, diaraoger an hormonou revel, ar c'hortikosteroidoù hag an trenkennoù bestle ; er gwad emañ ar c'holesterol e rezh ar c'holesterol HDL (*High Density Lipoprotein*) hag ar c'holesterol LDL (*Low Density Lipoprotein*), aterombar ar revec'h eus hemañ.

cholestérolémie ◇ **cholesterolaemia** ◇ **gwadvec'h g. kolesterol, kolesterolwadvec'h g.** Feur ar c'holesterol er plasma, ent reol etre 1,50 ha 2,50 g/l (etre 3,10 ha 6 mmol/l) (sl. *hypercholestérolémie*).

cholestérolose ◇ **cholesterolosis** ◇ **kolesteroloz g.** Anaez o c'hoarvezout eus koc'hionadoù kolesterol er gwiadoù ; deskrivañ a reer *kolesteroloz an avu* (Gl. *cholestérolose hépatique*), kleñved hêrezhel naouus dre ur revec'h lipoidel en avu hag alies e flugez all, *kolesteroloz ar gellenn vestl* (*cholestérolose vésiculaire*), anaez dianav e ardarzh, gantañ daspugnadoù lipidel (esterioù kolesterol) war glaourgenn ar gellenn vestl.

cholestéropexie ◇ **cholesteropexy** ◇ **kolesterollenañ** Gouzediñ ha daspugn ar c'holesterol er gwiadoù (ksantom, gwalenn lipoidel ar gornsa, aterom) pe e-barzh ar forzhioù pe ar gellenn vestl (grouan).

cholethorax ◇ **cholethorax** ◇ **bruskvestlad g.** Fennad bestl er c'hrezoù, da heul un daraez pe ar fregad eus ur c'hist hidatek a 'n avu.

choline ◇ **choline** ◇ **kolin g.** Aminalkool renket e-touez vitaminoù ar stroll B, ganet dre vetilañ an etanolamin (pe kolamin), a zo unan eus kedrannoù pennañ al lekitinoù hag ar sfingomielinoù ; o c'henel, dre aketilañ, un nervhanterad pouezus, an *aketilkolin* ; ivez, a-ser gant e zeverad dre oksidañ, ar *betain*, ur barenn vehingerc'h.

cholinergie ◇ **cholinergy** ◇ **kolinwerc'hañ** Dilaoskiñ an aketilkolin, hanterad kimiek o treuzkas an nervlanv e par ar sinapsoù : 1) er reizhiad parasimpatek a-bezh (adalek an nervgreizennoù betek ar flugez), 2) er reizhiad rakkangrennel ortosimpatek (adalek ar c'hreizennoù betek ar c'hangrennoù) hag e gwiannoù goudekangrennel ortosimpatek 'zo, 3) er vezonuslounezhenn, 4) er c'hevreoù nervenn-kaher.

cholinergique : **nerfs** ~s ◇ **cholinergic nerves** ◇ **nervennoù kolinwerc'her** Nervennoù o tilaoskiñ aketilkolin dindan wered ar broudañ.

cholinestérase ◇ **cholinesterase** ◇ **kolinesteraz g.** Enzim o tourranñ an aketilkolin er gwad hag er gwiadoù, ouzh e ezniñvañ.

cholinomimétique, acétylcholinomimétique ◇ **cholinomimetic, acetylcholine-like** ◇ **aketilkolingeveler aa. & g., aketilkolinvanek aa.** A-zivout un danvezenn heñvel he gwered ouzh hini an aketilkolin.

cholurie ◇ **choluria** ◇ **troazhvestlegezh b.** Bezañs eus elfennoù ar vestl en troazh ; termen arveret alies da arouezañ bezañs al livegennoù bestlel en troazh.

chondral ◇ **chondral** ◇ **migornel aa.** A-zave d'ar migorn.

chondrectomie ◇ **chondrectomy** ◇ **migornezvenañ** Dazbidañ darnel pe hollel migorn ur c'henvell, ur gostezenn, un dalpenn.

chondriolyse ◇ **chondriolysis** ◇ **kondriomloez g.** Distruj ar c'hondriom.

chondriome ◇ **chondriome** ◇ **kondriom g.** Hollad an organitoù a-strew dre brotoplasm ar c'helligoù e rezh greun distag (*mitokondri*), aridennadoù (*kondriomit*), bizhierigoù (*kondriokont*), o c'hoari ur roll a bouez e gwerederezh ar gellig (enaozerezh proteinoù 'zo).

chondrite ◇ **chondritis** ◇ **migornfo** g. Tanijenn ur migorn.

chondroblastes ◇ **chondroblasts** ◇ **kondroblast** s. Kelligoù eus ar migorn, diaraogerioù ar c'hondrokit.

chondroblastome bénin ◇ **chondroblastoma** ◇ **kondroblastom** g. Yoc'henn guñv, dibaot, o tizhout ar grennarded, loet peurliesañ e talpenn an eskern hir, ouzh he ober kelligoù a rizh kondroblastel e-barzh ur bleuskenn gondroidel; a-walc'h e vez he c'harzhellañ d'he fareañ.

chondrocalcinose articulaire ◇ **articular chondrocalcinosis** ◇ **kondrokalkinoz** g. ar **c'henvelloù** Anaev dianav e arbenn, naous dre an intradur eus halioù kalkiom e-barzh migern ar c'henvelloù, ar stirvigern hag ar stagelloù, oc'h erzerc'hañ ent klinikel e rezh resmiadoù arzfo lemm.

chondrocrâne ◇ **chondrocranium** ◇ **migordiaz** g. Hollad an elfennoù migorn a ya d'ober, dre askornaat, an darn vrasañ eus diaz ar c'hlopenn.

chondrocytes ◇ **chondrocytes** ◇ **kondrokit** s. Kelligoù azv eus ar migorn, pellennek, hep astenn kitoplasm, kludet e-barzh loganoù anvet kondroplast, strewet dre ar bleuskenn.

chondrodysplasie ◇ **chondrodysplasia** ◇ **miwe** g. ar **migorn**, **migornviwe** g. Anvad genadel ezreolderioù treuzkaset er mod aotomezek enkilek o tizhout diorreadur an eskern hag o tec'han kammneuziadoù, reoù anezho marvus *in utero* pe d'ar c'handedgezh.

chondrodystrophie ◇ **chondrodystrophia** ◇ **mideñv** g. ar **migorn**, **migornvideñv** g. Anvad genadel strafuilhoù ar migorn-barañ hag an askornaat enmigornel a orin enborc'hadel, gwazhiedel, kennevidel pe hêrezhel.

chondrogenèse ◇ **chondrogenesis** ◇ **migornbarañ** Diorren ar gwiad migornel.

chondroïde ◇ **chondroid** ◇ **migornvanek** aa., **kondroidel** aa. A neuz d'ar migorn.

chondromalacie ◇ **chondromalacia** ◇ **migornvlodad** g. Boukadur ar migern kenvell, stadet kevret gant un arzfo pe da heul un daraez.

chondromatose ◇ **chondromatosis** ◇ **kondromatoz** g. Mideñv hêrezhel, naous dre ar vezañs eus kondromoù e rezh enezigoù migorn strewek, o sezañ dangempartzhek e-barzh eskern an izili, e par an eizhaennoù dreist holl, en daouarn pergen, o tevoudañ berradur an eskern hir; kondromoù an eskern bras a zarvez dezho dedreñ e kondrosarkomou.

chondrome ◇ **chondroma** ◇ **kondrom** g. Yoc'henn guñv a wiad migornel oc'h evodiñ diwar mel an eskern, diwar ar gwiad askorn (*enkondrom*, Gl. *enchondrome*), pe diwar an amaskornenn (*perikondrom*, Gl. *pêrichondrome*); ar *c'hondromoù askorneiat* (Gl. *chon-dromes ossifiants*, *ostéochondromes*) a zinod er vugeliezh, sezet er bizied, bepred liesel hag o kreskiñ gorrek e rezh ec'haskornennoù.

chondropathie ◇ **chondropathy** ◇ **migornanaez** Klañvadur ar gwiad migorn.

chondrophyte ◇ **chondrophyte** ◇ **amdeñvenn** b. **vigorn**, **migorndeñvenn** b. Tagos migorn e-barzh ur c'henvell.

chondrosarcome ◇ **chondrosarcoma** ◇ **kondrosarkom** g. Yoc'henn yud kemmesk o sezañ alies e-kefin ar glin, anezhi elfennoù rizhellek a-strew en ur gwiad migornel; kondrosarkomou 'zo, diforc'hekaet kenan, a vez kammgemeret evit kondriomou kuñv, ar yuter anezho o vezañ prouet diwar-bouez un imbours'h kelligourel pizh.

chondrotomie ◇ **chondrotomy** ◇ **migornbenañ** Skejañ surjaniel ur migorn kostezenn.

chorde, **notoc(h)orde**, **c(h)orde dorsale** ◇ **notochord**, **chorda dorsalis** ◇ **notokordenn** b., **kordenn** b. **gein**, **arc'hlivenn** b. Garenig amparet gant kelligoù vakuolek loet war dalbenn a-gof an arc'hnerveg, ouzh he ober al lodenn diageinañ ha kreizer eus ar feilhenn grenn, a ya he dilerc'hioù d'ober gronnoù bouedennek an diskoù etremelloù.

chordite ◇ **chorditis** ◇ **plegfo** g. Tanijenn plegoù ar vouezh.

chordome ◇ **chordoma** ◇ **kordom** g. Yoc'henn yud an eskern evodet diouzh dilerc'hioù ar gordenn gein, loet ekefin ar c'henvigornad genneg-kilpenn, ar groazell pe ar belost.

chordopexie, **cordopexie** ◇ **chordopexy**, **cordopexy** ◇ **plegAanlenañ** Festañ surjaniel ur pleg mouezh en ul loadur arbellaat war-benn parraat ouzh steviadur ar c'harloc'henn diwar seizi daoudu an nesaerioù.

chordotomie, **cordotomie**, **myélotomie transversale** ◇ **chordotomy** ◇ **pañsenbenañ** Skejañ surjaniel ur pañs eus ar mel a-livenn.

chorée ◇ **chorea** ◇ **korea** g. Azoniad nerval o c'hoarvezout eus fiñvoù untu (*ledkorea*) pe daoudu, andiarvenn, emdarzh, trumm ha berr, direolioek, a ampled bras, muiek e gwrizienn an izili, kemmus en o dasparzh, o aliested, o buanded hag o c'hreñvder, kevret gant un istant hag un digenurz loc'hadel.

chorée de Sydenham, **chorée rhumatismale**, **chorea minor**, **danse de Saint-Guy** ◇ **chorea minor**, **Sydenham's chorea**, **juvenile chorea**, **paralysis vacillans**, **St. Vitus dance** ◇ **korea** **Sydenham**, **korea liek**, **korea remmel**, **droug Sant-Gi** Seurtad korea lemm e dianlen ur pore diwar strepokok gwadloezus, nes da remm lemm an arzoù hag adfeilhus eveltañ, o tarvezout gant ar grennarded hag o parañ hep arlenad (pa na vez ket un tizhad kalon kevret).

chorée fibrillaire, **chorée de Morvan** ◇ **fibrillary chorea**, **Morvan's chorea** ◇ **korea krehadek**, **korea Morvan** Seurtad dibaot a gorea "naous dre argrezadoù gwiennel oc'h anadiñ da gentañ e kigennoù ar c'hof gar hag e lodenn adreñv an divvorzhed,

oc'h emastenn a-wechoù da gigennoù ar c'hef ha d'un ezel krec'h zoken, hebiat bepred avat da gigennoù an dremm hag ar gouzoug" (Morvan); kevret gant ar c'hrehadoù e vez laurioù kriz en izili, kammeraez ar bleñchoù, kaouadoù c'hwezñ, dispuilhadoù kroc'hen, strafuilhoù bred (enkrez, ambren); anaez o tedeññ d'ar pare; ur virus nervgerc'h e ve ar gwezher anezhañ.

chorée héréditaire, chorée de Huntington ◇ **Huntington's chorea** ◇ **korea Huntington** Anaez dibaot, hêrezhel, treuzkaset er mod aotozomek trec'hek (war ar c'hromozom 4 emañ ar c'henenn giriek), oc'h anadiñ en oadouriezh; naouus 1) *ent klinikel* dre strafuilhoù bred (mineuzidoù : darluskegezh, darwantusted, gouvid, disleberadur ar meiz), loc'hadoù koreek gorrek, en dremm da gentañ, muiek en daouarn, reuter, anfiñv, droukfell a-wechoù; o tedeññ dindan etre 20 ha 30 vloaz etrezek ar fallezh hag an envedi; 2) *ent neuziadurel* dre isteñv ar gronn lostek, ar glosenn hag ar bluskenn empenn.

chorée hystérique, chorea major, chorée rythmée, chorée saltatoire ◇ **hysterical chorea, chorea major** ◇ **darfell g. korevanek** Erzerc'had dibarek a 'n darfell, barradoù ma vez ar gouzviad dizehan o fiñval, o piklammat, o treiñ penn a-gleiz hag a-zehoù, o treveziñ jestroù micherel, da skouer re ar gov o skeiñ war e annev.

chorée molle, chorée paralytique ◇ **chorea mollis** ◇ **korea gwak, korea peluzel** Korea a zo ar seizi e-touez e azonoù (korea gwak gwirion) pe a zo kevret d'ur seizi a orin all.

choréiforme ◇ **choreiform** ◇ **korevanek** aa. A-zivout un anaez, heñvel ouzh ar c'horea, sk. : *darfell korevanek*; a-zivout un azon, heñvel ouzh un azon a gorea, sk. : *fiñvoù korevanek*.

choréique ◇ **choreal, choreic, choreatic** ◇ **1 koreek** aa. **2 koreeg** g. **-ion 3 koreek** aa. 1 Gant ar c'horea. 2 G ouzviad ar c'horea. 3 A-zave d'ar c'horea.

choréo-athétose paroxystique kinésogène ◇ **paroxysmal kinesogenic choreoathetosis** ◇ **koreoatetoz grezvarrek fiñvien** Azonioù dianav e arbenn o c'hoarvezout a varradoù grezvarrek a loc'hadoù koreoatetozek delantek gant ar fiñval diarvonn.

choréo-athétosique : mouvements ~s ◇ **choreoathetoid movements** ◇ **fiñvoù l. (g.) koreoatetozek** Fiñvoù andiarvonn o tennañ dre arvezioù 'zo d'ar c'horea, dre arvezioù all d'an atetoz, stadet da geñver tizhadoù 'zo eus an derc'hvel.

chorio-adénome destruens ◇ **choriadenoma destruens** ◇ **korioadenom** g. **kenkizus** Seurtad mol hidatiform oc'h aloubiñ kaher ar grozh, dassezus a-wechoù, kuñv bepred koulskoude.

NOTENN : Gl. *chorio-* a zave pe 1) da *chorion* "kennenn diavaez ar vi" (sk. : *choriocarcinome*), pe 2) da *choroïde* "kennenn wazhiedek al lagad" (sk. : *choriorétinite*), pe 3) da *plexus choroïdes* "funigoù gwazhied loet e kambroù an empenn" (sk. : *chorioméningite*).

chorio-épilhiome, choriocarcinome, déciduome malin, placentome ◇ **chorioma, chorioepithelioma, chorioblastoma, choriocarcinoma, deciduoma malignum, trophoblastoma** ◇ **korioepiteliom** g., **korioarkinom** g., **dekiduom** g. **yud, plakentom** g., **koriom** g. Yoc'henn yud a 'r gwiaid trofoblastek, diwanet diwar an dorzhienn, dianlen peurliesañ d'ur mol hidatiform, o tispakañ e-barzh kavenn ar grozh en ur ensilañ kaher ar grozh, gwadliñvus kenan; deskrivañ a reer ivez korioepiteliomoù ar glidenn, ar vierrez; gwellaet kalz eo bet erbedad ar c'horioepiteliomoù gant araokadennoù ar c'himigurañ.

choriocapillaire ◇ **choriocapillaris** ◇ **tolgennwazhiedsae** b. Rouedadoù stank a gorrwazhied, gwelead diabarshañ an dolgennsae.

chorioméningite lymphocytaire, maladie d'Armstrong ◇ **lymphocytic choriomeningitis** ◇ **tolgennpilhonfo** g. **limfokitel, kleñved Armstrong** Pilhonfo lemm limfokitel, terzhiennek, gant amfuad ar rouedadoù tolgennek, kuñv peurliesañ, diwar ur virus nervgerc'h eus ar genad *Arenavirus*.

chorion ◇ **chorion** ◇ **1 tonenn** b. **2 korion** g. Gwelead gwiaid 1 Gwelead gwiaid kenglenel loet dindan gwelead epiteel an amwiskadoù; arveret e vez *tonenn* dreist holl e tro ar glaourgennoù hag al levrgennoù; evit tonenn ar c'hroc'hen e komzer kentoc'h eus *derm* (TA : *corium*), loet etre an *epiderm* pe *ezkroc'hen* hag ar c'*houdonenn* (Gl. *hypoderme*). 2 Kennenn diavaez ar vi; al lodenn eus ar c'horian a-dal d'ar c'hollgenn aziaz, warni ar *bodennoù torzhienn* (Gl. *villosités placentaires*), eo ar c'*horion bodennek* (Gl.Sz. *chorion frondosum*), al lodenn hep bodennoù eo ar c'*horion levn* (Gl.Sz. *chorion levé*).

chorionique : gonadostimuline ~, gonadotrophine ~, hCG ◇ **human chorionic gonadotrophin, hCG** ◇ **gonadotrofin** g. **korion(el) denel, hCG** Hormon borc'het gant bodennoù ar c'horian, kavet a-fonn e gwad hag e troazh an dougerezed; ur rann anezhañ, ar β-hCG, a zezventer evit deznouañ kentrat ar vrazzedd, a arverer ivez evel merker bevoniell yoc'hennoù an dorzhienn pe ar glidenn (sl. *grossesse : diagnostic biologique de la ~, marqueurs tumoraux*).

choriorétinite ◇ **chorioretinitis** ◇ **tolgennluc'hsae** g. Tanijenn an dolgennsae hag al luc'hsae (sl. *choroïdite*).

choroïde ◇ **choroid** ◇ **tolgennsae** b. Kennenn wazhiedek al lagad loet etre al luc'hsae hag al lersae adalek an nervedenn weled betek ar vevenn heskennek (Gl.Sz. *ora serrata*).

choroïde : plexus ~s ◇ (TA) **plexus choroïdes** ◇ **rouedad** b. **tolgennek** Funigoù gwazhied loet e kambroù an empenn dindan an epiteilienn epidimel, o vorc'hañ al liñvonn benn-kein.

choroïdien ◇ **1 choroïdal 2 choroïd(al)** ◇ **1 tolgennsae(l)** aa. **2 tolgennek** aa. 1 A-zave d'an dolgennsae (sk. : *dic'henezhadur an dolgennsae*, Gl. *dégénères-cence choroïdienne*). 2 A-zave d'ar rouedad tolgennek, skritell lakaet ivez war an talmerrennoù dibennet er rouedadoù tolgennek oc'h eroueriañ parzhioù empenn diseurt (sk. : *talmerenn dolgennek araok*, Gl. *artère choroïdienne antérieure*).

choroïdien : **syndrome de l'artère ~ne antérieure** ◇ **anterior choroidal artery syndrome** ◇ **azoniad an dalmerenn dolgennek araok** Testkadoù an azonou e dalc'h steviad an dalmerenn meneget : ledseizi, ledaneraez, ledangwel diavann unsko, hep strafuilh en arc'hwelioù uhelañ.

choroïdite ◇ **choroiditis** ◇ **tolgenssaefo** g. Tanijenn an dolgenssae, kevret alies gant tanijenn al luc'hsae (sl. *chorio-rétinite*) hag ar ganevedenn (*envestolgenssaefo*, Gl. *iridochoroïdite*).

choroïdose ◇ **choroidosis** ◇ **koroidoz** g. Dic'henezhadur an dolgenssae, rouestlad d'an isstiwel alies.

choroïd- / **chori-**

• *cellule du chorion cytogène de l'endomètre* kellig eus tonenn gelligparus an enkrozhenn • *espace compris entre la plaque choriale et la lame basale du placenta* esaou gavalet etre haen gorion ha haen diaz an dorzhienn • *le chorion de l'intestin grêle* tonenn ar vouzellenn voan • *méningite aiguë lymphocytaire avec infiltration des plexus choroïdes* pilhonfo lemm limfokitel gant amfuad ar rouedadou tolgennek • *trouble d'origine choroïdénienne* strafuilh a orin tolgennluc'hsaeel.

chromaffinome, phéochromocytome ◇ **phaeochromocytoma** ◇ **kromafinom** g., **feokromokitom** g. Yoc'henn evodet diouzh ar c'helligoù kromlen eus ar vezonuslouezhenn, puilh enni an adrenalin hag an noradrenalin ; erzerc'hañ a ra dre varradoù uswask a c'hell devoudañ falladur ar galon hag al lounezh hag orc'hadoù empen.

chromagogue : **fonction** ~ ◇ ◇ **arc'hwel livec'holañ** Arc'hwel a 'n avu, anezhañ douhenniñ eus ar gwad ha degorzhañ dre ar forzhioù bestl livuzennoù 'zo bet ebarzhet ent kalvezadel er bevedeg.

chromatide ◇ **chromatid** ◇ **kromatid** g. Pep hini eus an div edañvenn a ya d'ober ar c'hromozom, hewel e-doug ar metafaz dreist holl, o div stallet kenstur ha kevret dre ur poent, ar c'hentromer (sl. *centromère*).

chromatine ◇ **chromatin** ◇ **kromatin** g. Danvezenn vazennlen skor d'an hêrelezh, amparet evit un darn vras gant trenken dezosiribonukleek (DNA), stallet e rezh rouedad e-barzh ar graoñell e-doug an etrelankad, treuzfurmet e kromozomoù da geñver emrannadur ar gellig.

chromatique : **variables** ~s ◇ **chromaticity coordinates** ◇ **davevennoù** l. (b.) **livegezh** Argemmennoù dibabet evit naouusteriñ an *arne* (Gl. *tonalité chromatique, teinte*), al *leunvez* (Gl. *saturation*) hag al *emphlugern* (Gl. *luminosité*) eus al livioù a verzher (sl. *trivariance visuelle*).

chromatisme, aberration chromatique ◇ **chromatism, chromatic aberration** ◇ **livskar** g., **gouskoevad** g. **trohedel, gouskoevad livel, mistiegezh b. trohedel, mistiegezh livel** Anadenn o c'hoarvezout pa vez argemmus feuriader gouskogañ un ardivik optikel hervez trohedoù al luc'h : gouskoevad luc'hel a vez, o tistrannañ ar skinoù luc'h hervez o liv hag o tec'han ar furmidigezh eus orennoù liesliv.

chromatographie ◇ **chromatography** ◇ **livnizhañ, kromatografiñ** Araezad disrannañ kedrannoù ur meskad liñvel pe aezhel ; evit al *livnizhañ en arvez liñvel* (Gl. *chromatographie en phase liquide*), e souber penn ur vandenn baper dalc'het a-zerc'h el liñvenn da elfennañ, ha silluskañ a ra kedrannoù houmañ seul uheloc'h ma vezont nebeutoc'h amsunet gant ar paper (hentenn arveret evit hennadiñ ha dezventañ ar proteinoù, glukid ar plasma, an enzimoù, an hormonoù, h.a.) ; diwar-bouez ur gediuzeñn e vez livet an takadoù a furmont ; un askenad eo al *livnizhañ dre zaspazh* (Gl. *chromatographie de partage*) ma tisparter kedrannoù al liñvenn, ouzhpenn dre an amsunadusted anezho, dre o dileizhadusted e dileizherioù bet intret er paper ; gant hentenn al *livnizhañ en arvez aezhel* (Gl. *chromato-graphie en phase gazeuse*) e vez bountet an danvezennoù da elfennañ ebarzh ur golonenn dispartiañ ha hennadet an eil da heul eben dre un dinoer.

chromatolyse ◇ **chromatolysis** ◇ **kromatinloezañ, kromatinloez** g. Dic'henezhadur ha steuziadur ar c'hromatin er graoñell, a zo unan eus lankadoù diwezhañ emdroadur ar gellig.

chromatophome ◇ **chromatophoroma** ◇ **kromatoforum** g. Yoc'henn evodet diouzh ar c'hromatofor, kelligoù an derm pe an dolgenssae a zo o arc'hwel reol dedaoliñ ar melanin.

chromatopsie ◇ **chromatopsia** ◇ **arnewel** g. Kammzerc'hañ un arliv war an traoù a weler, strafuilh a orin nerval (drouk-fell) pe tolgennluc'hsaeel (pistriadiurioù, ikter, h.a.) ; hervez an arliv e reer anv eus *glazarnewel* (Gl. *cyanopsie*), *gwerarnewel* (Gl. *chloropsie*), *melenarnewel* (Gl. *xanthopsie*), *ruzarnewel* (Gl. *érythropsie*).

chrome ◇ **chromium** ◇ **krom** g. Elfenn gimiek a niverenn atom 24 (arouez Cr), metal oksidadus kenan, o koll 2, 3 pe 6 elektronenn ha mont d'ar stad stabil a ion kromus Cr²⁺, kromek Cr³⁺ pe kromat Cr⁶⁺ ; evel nemeurelfenn e tasperzhe e kennevid ar glukid.

chrome 51, ⁵¹Cr ◇ **radiochromium, ⁵¹Cr** ◇ **radiokrom, ⁵¹Cr** Skinelfenn, 27,75 deiz he hanterhoali, oc'h ec'hodiñ ur skindad X dezverkus d'ar vanadium hag ur skindad γ a 0,32 MeV ; talvout a ra da diellañ an hemati hag ar pladanoù evit muzuliañ o hoali.

chromhidrose, chromidrose ◇ **chromhidrosis** ◇ **c'hwezlivegezh** b. Strafuilh arc'hwelel ar gwagrennoù c'hwezpar, en divgazel dreist holl, anezhañ borc'hañ c'hwez livek, du, gell, glas, gwer, melen pe ruz.

chromoblastomycose, chromomycose ◇ **chromoblastomycosis** ◇ **kromoblastomikoz** g. Mikoze trovanel ar c'hroc'hen diwar un arvevad a liv gell pe du.

chromodiagnostic ◇ **chromodiagnosis** ◇ **liveznaouiñ** Studi liv an organoù pe an dourennoù e stern an deznaouiñ.

chromogène ◇ **chromogen** ◇ **1 liveiat** aa. **2 liveiad** g. 1 O c'henel liv, sk. bakteri liveiat. 2 Danvezenn diliv drezi he unan, en araez da c'henel un aozad livek diwar zelanvadoù lavaret ; arveret e vez al liveiadoù en elfennerezh bevgimiek kementadel (sl. *colorimétrie*).

chromogènese ◇ **chromogenesis** ◇ **livegennbarañ** Bevenaozañ al livegennoù.

chromohémodynamographie ◇ **chromohaemodynamography** ◇ **kromohemodynamografiñ** Studi krommenn dizolc'hiñ un danvezenn livek ensinklet en amred ar gwad (sl. *dilution : courbe de ~*).

chromolyse ◇ **chromolysis** ◇ **livsteuz g.** Koll liv al luc'hsae diwar anaezioù 'zo evel an nervennfo gweledele.

chromomère ◇ **chromomere** ◇ **kromomer g.** Pep hini eus ar greunanoù livlen kenan stalet a-linenn a-hed ar c'hromatidoù, ennañ ur bodad gen stank pe stankoc'h.

chromophile ◇ **chromophil** ◇ **livlen aa.** Lenidik ouzh al livuzennoù.

chromophillyse, chromophilolyse ◇ **chromatolysis** ◇ **livlensteuz g.** Dic'henezhadur ha steuzidigezh ar c'horfigoù danvezenn livlen eus an nervgelligoù.

chromophobe ◇ **chromophobe** ◇ **livlez** A-zivout ur gedrann gellig pe wiad nad eo ket lenidik ouzh al livuzennoù trenkek pe bazek.

chromophore ◇ **chromophore** ◇ **kromofor g.** Hollad ar strolloù kimiek (korvelloù porfirek, amindrenkennoù, h.a.) a zo e devoud bezañs ar bannoù lugañ stadet e skalfadluc'hventerezh an dileizhennoù molekulel.

chromoprotéine ◇ **chromoprotein** ◇ **kromoprotein g.** Protein livek a zo un elfenn vetelek en e stroll prostetek, da skouer an hemoglobin a zo houarn en e stroll prostetek.

chromosome ◇ **chromosome** ◇ **kromozom g.** Bazhig oc'h anadiñ e-barzh ar graoñell war emrannañ, o tisoc'h eus darnaouadur ar rouedad kromatin; neuz ar c'hromozomoù a ve e dalc'h pazennoù ar mitoz : er prometafaz e wiskont stumm un X gant div vrec'h hir ha div vrec'h verr; arstalek eo niver ar c'hromozomoù e pep spesad loened (sl. *caryotype, centromère, chromatine, mitose*).

chromosome acentrique ◇ **acentric chromosome** ◇ **kromozom akentrek** Kromozom hep kentromer.

chromosome acrocentrique, chromosome télacentrique ◇ **acrocentric chromosome** ◇ **kromozom akrokentrek** Kromozom heñvel ouzh ur V eilpennet dre ma 'z eo nes e gentromer da unan eus e bennoù, bihan tre e vrec'h verr enta.

"chromosome du crime", syndrome du double Y, triplet XYY ◇ **XXX genotype** ◇ **azoniad an daou Y, genotip g. XYY** Gouskoevad kromozomel naouus dre un drizmiezh : ar vezañs eus tri c'hromozom revel XYY, gwariadenn o tizhout 0,11 % eus ar c'houreved; reol e vez ar fenotip, bras ar savder (etre 1,80 ha 1,86 m — notañ a reer evelkent 10 % a zaou Y gant ar baotred a ouzhpenn 2 m savder); e 1965, da heul un enklask, e kredas Jacobs & kenl. dezren e kaver aliesoc'h ar c'hariotip XYY gant al labaned, ar fellerion, ar vuntrerion, alese keal ar "c'hromozom a 'r c'houl", klozadur distaolet hiziv pa na verk ar stadegoù kemm ebet etre realezh brasniver ar gouzrec'hioù XYY ha realezh brasniver ar gouzrec'hioù XY (sl. *aberration chromosomique, caryotype*).

chromosome en anneau ◇ **ring chromosome** ◇ **kromozom gwalennek** Kromozom a zo aet kemped an daou benn anezhañ da heul un torr pe ar c'holl eus ar c'hentromer.

chromosome homologue ◇ **homologous chromosome** ◇ **kromozom kevelep** Pep hini eus an daou gromozom a ya d'ober ur re (Gl. *paire*) en ur gellig diploidel; pa reer anv a c'hen e komzer kentoc'h eus genenn allel, allelenn (sl. *allèle*).

chromosome métacentrique ◇ **metacentric chromosome** ◇ **kromozom metakentrek** Kromozom a zo loet e gentromer nes da greiz e hed, a zo enta par pe dost e vrec'hioù.

chromosome Philadelphie ◇ **Philadelphia chromosome** ◇ **kromozom Filadelfia** Kromozom a 'r re (Gl. *paire*) 22 kollet gantañ an hanter eus e zanzev (dilead e vrec'h hir) pe, peurliesañ, eskemmet an tamm-se ouzh un tamm eus ur c'hromozom a 'r re 9 (treuzemprad etre brec'hioù hir kromozomoù ar reoù 22 ha 9); gouskoevad stadet e kelligoù ac'had mieloidel ar mel eskern e-kerz al leukemiezh vieloidel.

chromosome plumeux, chromosome en rince-bouteille ◇ **lamp brush chromosome** ◇ **kromozom houpet** Stad ma vez kromozomoù ar c'hwezigen eginel, outo barvennoù hir a bep tu, e-kerz kresk an ovokitenn.

chromosome X fragile : syndrome du ~ ◇ **fragile chromosome syndrome** ◇ **azoniad ar c'hromozom X bresk** Kleñved o kevredañ labaned, kellusvent, mineuz a 'n dremm ha gouskoevad ar c'hromozom X, moanaet hag arheded eizhaenn bellek ar vrec'h hir anezhañ [load X (fra) q 27.3].

chromothérapie ◇ **chromotherapy** ◇ **livgurañ** 1 Dedalvezañ yac'hadel al luc'h livek. 2 Arver yac'hadel al livuzennoù.

chromotropisme ◇ **chromotropism** ◇ **1 livgerc'hañ, livgerc'h g. 2 livgerc'h, livvre b.** 1 Perzh ar protoplasm ha traoù bev 'zo da dreiñ ouzh pe da zistreiñ diouzh al liv-mañ liv (*livgerc'h yaek, nac'hek*, Gl. *chromotropisme positif, négatif*). 2 Hoalerezh al liv-mañ liv war psikopated 'zo, stadet da geñver proud Rorschach.

chronaxie ◇ **chronaxia** ◇ **leiapad g.** Pad arloañ ur red tredan gant ur read daougement d'al leiaread ret da ziraec gwehin an argrezañ en ur gigenn, eleze da zelankañ un erwezh broudañ ganti (sl. *rhéobase*).

chronique ◇ **chronic** ◇ **henek aa.** A-zivout un devoud kleñvedel, o tedreiñ gorrek, o padout pell amzer; dre ledanviñ e komzer eus *klañvourion henek*; ar bezañ henek, a-zivout un devoud kleñvedel, eo an *henegezh* (Gl. *chronicité*).

chronique

- *endartérite chronique* entalmerennfo henek
- *il existe plusieurs formes chroniques de la maladie* lies furm henek ez eus d'ar c'hleñved
- *inflammation aiguë, subaiguë ou chronique* tanienn lemm, goulemm pe henek
- *insuffisance chronique de l'irrigation*

skorted henek an eroueriañ • *maladie chronique* kleñved henek • *péricardite chronique* amgalonennfo henek • *utilisation chronique d'un médicament* hirarver ul lia.

chronobiologie ◇ **chronobiology** ◇ **Amzervevoniezh** b. Skourr a 'r Vevoniezh o studiañ dedro anadennoù ar beved a-gevreizh gant an amzer; c'hoarvezout a ra an kez dedro e rezh luskelladoù korvezek a arouez en o c'heñver gant pad an nozdeiz : *trozeziat* (sl. *circadien*), *danzeziat* (sl. *infradien*), *dreistdeziat* (sl. *ultradien*), pe gant pad ar bloaz : • *trovloaziat* (sl. *circannien*), h.a.

chronodépendance ◇ **time-dependence, chronodependence** ◇ **1 amzeramzalc'h g. 2 predamzalc'h g. 3 padamzalc'h g.** 1 Keñver a geflended etre un devoud bevedel (arc'hwel, gwadvec'h, h.a.) hag an amzer (pred, pad). 2 Keñver un devoud bevedel gant mare an nozdeiz, sk. : gwerc'h ul lia hervez pred an diounit. 3 Keñver un devoud bevedel gant ar badelezh, sk. : gwerc'h ul lia a-geflen gant pad an diounit.

chronodietétique ◇ ◇ **Amzervouedoniezh** b. Skourr ar Vezekniezh o plediñ gant ar c'heñverioù etre an emvagañ hag ar c'horvezioù bevedel.

chronographe ◇ **chronograph** ◇ **padwezer g. -ioù, kronograf g.** Ardivink o lerc'hwezañ keñver ha keñver dibun an amzer ha dedro un anadenn; distroadet eo bet ar c'hronograf gant al lerc'hwezañ stlennegel.

chronopathologie ◇ **chronopathology** ◇ **Amzergleñvedouriezh** b. Skourr ar Vezekniezh o studiañ dedro ar c'hleñvedoù a-geñver gant korvezioù bevedel ar gouziviad.

chronopharmacologie ◇ **chronopharmacology** ◇ **Amzerliaoniezh** b. Studi an argemmoù eus gwered al liaoù a-geñver gant ar c'horvezioù bevedel (sl. *chronobiologie*).

chronosusceptibilité ◇ ◇ **amzererwezhiusted** b. Kizidigezh, darbennusted ar bevedeg a-geñver gant lankadoù e gorvezioù bevedel.

chronothérapeutique, chronothérapie ◇ **chronotherapy** ◇ **Amzeryac'hadouriezh** Diskiblezh soliet war an Amzerliaoniezh o savelañ efedusted al liaoù hervez ar pred ma vezont diounezet.

chronotrope ◇ **chronotropic** ◇ **1 talmwezher aa. 2 talmwezher g. -ioù** 1 Oc'h angorzhañ talm ur gorvez, hini lammoù ar galon pergen. 2 Danvezenn dalmwezher; un *talmwezher yaek* pe *talmuswezher* (Gl. *chro-notrope positif*) a herreka an talm, un *talmwezher nac'hek* pe *talmiswezher* (Gl. *chronotrope négatif*) a c'horreka an talm (sl. *bêtarécepteur*).

chrysose ◇ **chrysiasis** ◇ **kriziaz g.** Koc'hionadoù aour a orin yac'hadel er gwiadoù.

chrysopexie ◇ **chrysiasis** ◇ **aourlenañ** Lenañ ha yoc'hañ an aour e-barzh ar gwiadoù, er gwiad retikuloendotelel pergen, en avu, el lounezhi da geñver an aourgurañ.

Chrysops, mouche filaire ◇ **Chrysops** ◇ **Krizops s., kelion s. filarius** Amprevaned diptereel, Brakikerel, ortorafel ha gwad-ezat, eus kerentiad an Tabanideged, iskerentiad ar Pangonineged, trezouger milanaezioù diseurt, en o zouez ar filariaz diwar loa loa.

chrysothérapie, aurothérapie ◇ **chrysotherapy** ◇ **aourgurañ** Arver yac'hadel an halioù aour, bet ergemennet da gentañ ouzh an dorzhellegezh, diounezet hiziv ouzh furmoù 'zo a liesarzfô rumatoidel.

chuintement ◇ **hissing** ◇ **chuchuiñ** Kammzistagañ ar soniad [s] dre erlec'hiañ outañ ar soniad [ʃ]

chute

• *chute de cheveux* kouezh ar blev • *chute de la dent* kouezh an dant • *chute de la masse sanguine circulante* digresk / leiadur tolz ar gwad amredat • *chute de la pression artérielle* koemp ar gwask talmerel • *entraînant la chute du sujet* o tevoudañ kouezh an den.

Chvostek : **signe de ~, signe du facial** ◇ **Chvostek's sign** ◇ **arouez b. Chvostek** Argrezadenn verrbad penn uhelañ kigenn gelc'hennek ar genoù hag ar gigenn drompilher pa giziaetaer barroù gen-boc'h nervern an dremm (adreuz d'ar parzhioù meizh e kreiz ul linenn treset eus freilhan an divweuz da flipezenn ar skouarn), test an usvroudadusted kaherel a seller evel naouus d'an detaniezh.

chyle ◇ **chyle** ◇ **sugenn** b. Limf a neuz laezhek, en arlug enni druzennoù ar c'hoazhadur, dehetet gant ar sugennsaniouù adalek ar vouzellenn voan betek ar san vrusk.

chyleux ◇ **chylous** ◇ **1 sugennel aa. 2 sugennel** aa. 1 Gant neuz ar sugenn, sk. : *dourvozhell sugennek* (Gl. *hydrocèle chyleuse*). 2 A-zave d'ar sugenn.

chylifère : **vaisseaux ~s** ◇ **chyliferous vessels, lacteal vessels** ◇ **sugennsaniouù l. (b.)** Saniou limf o tehentiñ ar sugenn eus ar vouzellenn voan (yunegenn ha klunegenn) d'ar san vrusk.

chyliforme ◇ **chyliform** ◇ **sugennek aa., sugenneñvel** b. A-zivout liñvennoù a zo dezho neuz ar sugenn.

chylomicrons ◇ **chylomicron** ◇ **kilomikron s.** Seurtad lipoproteinoù a 'r gwad, skañv hag ec'honek ar molekul anezho; amparet gant etre 80 ha 90 % a driglikeridoù ezdeuat; bezant er gwad goude ur pred druzennoù (*kilomikron gwir* pe *kentael*); ar *c'hilomikron eivedel* (pe *lipomikron* pe *prebetalipoproteinoù*), ponneroc'h ha bihanoc'h o molekul, zo enno 60 % a driglikeridoù endeuat ha 15 % a golesterol.

chylopericarde ◇ **chylopericardium** ◇ **amgalonennsugennad g.** Fennad sugenn en amgalonenn da heul enfrez pe steviad ar san vrusk dre ur yoc'henn pe da heul un daraez.

chyloperitone, ascite chyleuse ◇ **chyloperitoneum** ◇ **torsugennad g., torliñv g. sugennel** Fennad sugenn e-barzh kavenn an ampeleñ.

chylorrhée ◇ **chylorrhoea** ◇ **sugennver g.** Naouez anreol ar sugenn, peurliesañ diwar freg ar san vrusk.

chylothorax, pleurésie chyleuse ◇ **chylothorax** ◇ **brusksugennad g., sugenniñv g. er brusks, brusksugenniñv g.** Fennad sugenn e kavenn ar c'hrezoù diwar freg ar san vrusk.

chylurie ◇ **chyluria** ◇ **troazhsugennegezh b.** Bezañs sugenn en troazh, o reiñ dezhañ un neuz laezhek, devoudet peurliesañ gant steviad ar forzhioù limf e parzh uhelañ ar c'hof pe e-barzh ar brusks da heul ur filariad pe ur yoc'henn drek-ampeleñ; kevret e vez alies gant un droazhwadegzh (*troazhwadsugennegezh, Gl. hématochylurie*).

chyme ◇ **chyme** ◇ **youstenn b.** Yodenn o tisoc'h eus danzeadur ar c'hir boued gant ar c'hoaz-hañ genaouel ha kreuzel; goude treuziñ ar porzhier dre rannadoù kenheuilh e tedro doareoù fizikel-kimiek ar *youstenn greuz* (Gl. *chyme gastrique*) aet da *youstenn bervez* (Gl. *chyme intestinal*) betek amparañ an oulennoù (Gl. *fèces*) pe mongir (Gl. *bol fécal*).

chymotrypsine, alphachymotrypsine ◇ **alphachymotrypsin** ◇ **alfakimotripsin g.** Enzim o tisoc'h eus blivaerezh ar c'hi-motripsinogen gant un tripsin ebarzh an daouzegeñ; dre e berzhioù proteinloezañ ha fribrinloezañ e vuana assugadur ar gouliñv hag ar gwadliñvoù hag e wella amred lec'hel ar gwad pe al limf; e se en ar verer evel enepfoeg.

chymotrypsinogène ◇ **chymotrypsinogen** ◇ **kimotripsinogen g.** Diaraoger anniñvek bore'het gant an ilgreiz, treuzfurmet gant an tripsin en alfakimotripsin niñvek (sl. *chymotrypsine*).

cible ◇ **target** ◇ **1 bukenn b. 2 bukva g.** 1 Pezh metal dazlakaet en hordenn eztreu ur c'hwimmer elektron hag arveret da ec'hoder skinadoù α , β , X pe γ (sl. *anticathode, bêtatron*). 2 Kedrann gellig kizidik ouzh gwezhioù fizikel (ar skinadoù X, β , γ pergen); ent dibarek ez anver *bukva* al lec'hienn vrientek en ur volekulenn DNA eus ar gaoñell pe eus ur viuz ma c'hoarvez un anaf eiltroüs pe get diwar enorc'h ur rannig ionaus (sl. *puce ADN, sonde génétique*).

cicatrice ◇ **scar** ◇ **kleizenn b.** Gwiad nevezfurmet oc'h adunaniñ ar parzhioù bet disrannet dre ur gloazad, un enloezad, un devad, ur gwezh surjaniel; e par ar c'hroc'hen e c'hoarvez a adluniañ an derm hag an epiderm dre berzh un argerzh stirekaat doues pe douesoc'h (sl. *chéloïde*).

cicatrision ◇ **healing** ◇ **kleizennañ, kigañ** Fumiñ ur gleizenn; ent klasel e tigemmer ar rummoù-mañ kleizennañ : 1) *kleizennañ dre gendennad kentañ* pa zeu brielloù ar gouli a-gestok ent emdarzh pe dre grafaelañ ha pa na vez ket poread; 2) *kleizennañ dre eil kendennad*, gorrekoc'h, pa chom a-skar brielloù ar gouli, pa vez poread ha pa vez barret an dislev gant tiñvennoù; aozerion 'zo a ziforc'h tri rumm : 1) *kleizennañ agentizh dre gendennad kentañ*, 2a) *kleizennañ agentizh dre eil kendennad* pa reer d'ar brielloù mont a-gestok en ur c'holeñ an tiñvennoù, 2b) *kleizennañ a-handizh pe dre drede kendennad* pa lezer an tiñvennoù da epidermaat (sl. *bourgeois charnus*).

cicatric/s-

• *accolement d'origine inflammatoire ou cicatricielle* kempedg tanijennel pe kleiz-enel • *alopécie cicatricielle* diwaoutad kleizennel • *atrophie cicatricielle* isteñv kleizennel • *cicatrice traumatique ou lésionnelle* kleizenn daraezel pe anafel • *cicatrissant* kleizennus • *favoriser la cicatrision* aesaat ar c'hleizennañ.

ciliaire : **corps** ~ ◇ **ciliary body** ◇ **korf g. ar saeoù, korael b.** Parzh ardev eus sae wazhiedek al lagad, etreat d'an dolgennsae ha d'ar ganevedenn, dezhañ stumm ur walenn a skejad tric'hornek; d'e ober ez a *askouezhioù ar saeoù* (Gl. *procès ciliaires*) o vorc'hañ dourenn al lagad ha *kigenn ar saeoù* (Gl. *muscle ciliaire*) o perzhiañ en argeidañ; outañ emañ enlenet *gourizig ar saeoù* (Gl. *zonule de Zinn*).

cils ◇ **eyelashes** ◇ **malgud s.** Blev reut ha kromm ensteudet war ribl rez ar malvennoù.

cils vibratiles ◇ **cilia, vibratil processes** ◇ **blevanoù l. (g.) kreniat** Azledadoù kitoplasm e furn bizied maneg, berr ha moan, diouzh blein kern kelligoù 'zo, un *diazkorfig* (Gl. *corpuscule basal*) e dibenn o gwriazienn, ganto un arc'hwel fiñval; niverus kenan alies, e lakaont dre o fiñv danvezzennoù evel ar glour da zilec'hiañ war c'horre an epiteliannoù blevanek, er bronkez da skouer.

cils : **syndrome des ~ immobiles, dyskinésie ciliaire primitive** ◇ **immobile cilia syndrome** ◇ **azoniad ar blevanoù difiñv, mifiñv g. kentael ar blevanoù** Anaezad hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, naouus dre anniñv ar blevanoù kreniat epitelel, o tevoudañ adalek an oad kentañ frifoioù arreat, da rouestladoù dezho godfoioù, bronkezfoioù, usvoll bronkez; difiñv ha gaonac'h e vez ar speredligoù; ur wech diwar div e stader ur *situs inversus*.

cil-

• *épithéliums ciliés* epiteliannoù blevanek • *ganglion ciliaire (ganglion ophtalmique)* kangrenn ar saeoù • *racines ciliaires* gwriizioù blevan • *ciliaire, relatif aux cils* blevanek, azave d'ar blevanoù.

ciment dentaire ◇ **cement** ◇ **simant g. (dent)** Danvez a ra an dentourion gantañ evit barrañ kavennoù an dent bruket pe siellañ an osodoù.

cimentoplastie ◇ ◇ **enatelviñ** Ensinklañ treuz-kroc'hen ur polimer akrilek e-barzh un dassez askom en amboaz dic'hostañ ha kevandiñvañ, sk. : *enatelviñ ur vellenn* (Sz. *vertebro-plasty*).

cimettere : **syndrome du ~** ◇ **scimitar syndrome** ◇ **azoniad ar semterenn** Skeudenn skinlun eus ar brusks e stumm un demerenn linennek kromm a-stur gant ribl dehou ar galon, naouus d'un distro darnel eus gwad ar skevent dre ar wazhienn gav izelañ, kevret alies gant iswe ar skeventenn dehou, dehouloadur ha dehouloadur ar galon.

Cimex lectularius ◇ *Cimex lectularius* ◇ *Cimex lectularius* Anvad rummourel al *louseae*, seurtad amprevaned Hemipter, Heteropter, gwadezat, eus kerentiad ar C'himikideged, pukadek o c'horf, pemptuek o fenn, ribloù silhek d'o frotoraks gant un diaraog krouizek ha kostezioù ledan krommet war grec'h; dezho ur roll kevelat e treuzkasadur an derzhienn arreadek diwar laou hag eus un niver riketsiozoù.

ciné-angiocardigraphie ◇ *cineangiocardigraphy* ◇ **skinfiñvluniñ gwazhied ha kalon, gwazhiedkalonfiñvluniñ** Lerc'h-wezañ dre skinluniñ fiñvoù ar gwazhied hag ar galon bet demeraet.

ciné-angiographie ◇ *cineangiography* ◇ **skinfiñvluniñ gwazhied, gwazhiedfiñvluniñ** Lerc'h-wezañ dre skinluniñ fiñvoù ar gwazhied bet demeraet.

ciné-angiostigraphie, ciné-angiographie isotopique ◇ *radionuclide cineangiography* ◇ **skingannfiñvluniñ gwazhied, gwazhiedkannfiñvluniñ, gwazhiedfiñvluniñ izotopek** Lerc'h-wezañ un heuliad skingannluniñ eus ar gwazhied goude ebarzhiñ enno un izotop skinoberiek.

ciné-oesophago-gastro-scintigraphie ◇ *cineoesophago-gastroscintigraphy* ◇ **skingannfiñvluniñ treizher ha kreuz, kannfiñvluniñ treizher-kreuz** Lerc'h-wezañ dre skingannluniñ trehentadur koazhadel ur pred tiellet dre ur skinizotop; arveret da imboure'hñ ar gindrehent kreuz-treizher gant ar vugale yaouank.

cinécoronarographie ◇ *cinecoronaro arteriography* ◇ **skinfiñvluniñ kuruner, kurunerfiñvluniñ** Lerc'h-wezañ dre skinluniñ fiñvoù an talmerennoù kuruner.

cinéammagraphie ◇ *cinéammagraphy* ◇ **gammafiñvluniñ** Lerc'h-wezañ dre ur c'hamera skingannluniñ an dehentadur dre ar bevedeg eus un izotop skinoberiek ebarzhet dre ur wazhiedenn.

cinématique ◇ *kinematic* ◇ **fiñvoniñ** A-zave d'ar Fiñvoniezh.

cinématique ◇ *kinematics* ◇ **Fiñvoniezh** b. Studi keñver al loc'hañ ouzh an amzer (sl. *cinétique*).

cinépathie, cinétose, mal des transports ◇ *motion sickness* ◇ **teadell b., droug g. an dezougen** Anvad rumm evit anaez an araezioù dezougen : ar bigi (*droug mor*, Gl. *mal de mer, naupathie*), ar c'hirri (*droug karr*, Gl. *mal d'auto, ochopathie*), an nijerezed (*droug nij*, Gl. *mal de l'air*), h.a. (sl. *antinaupathique*).

cinéplastie, amputation orthopédique ◇ *cineplastics* ◇ **fiñvatelviñ, bevfiñvekaat** Seurtad ambañ un ezel a gorvoer ar c'higennoù hag ar stirenoù a chom anezhañ evit keflac'hañ un erstedell azasaet.

cinéscintigraphie ◇ *cinescintigraphy* ◇ **skingannfiñvluniñ** Lerc'h-wezañ un heuliad skingannluniñ eus ur flugezenn pe eus ur parzh korf goude ebarzhiñ un izotop skinoberiek er bevedeg.

cinèse ◇ *kinesis* ◇ **1 bevfiñv g. 2 bevfiñvad g., bevfiñverezh g.** 1 (Termen a Leuñvouriezh) nep dilec'hiañ eeun eus ur parzh korf, oberiat pe c'houzañvat, e-ser un embreg oueskaat pe addiorren. 2 heuliad ar bevfiñvoù ret da gas da benn un embregad lavaret; pa vez anv eus ur fiñval diwar gentod an aroueler, e komzer kentoc'h eus *defiñval* (Gl. *mobiliser, mobilisation* hag er c'henstrolladoù : Gl. *-cinèse*) (sl. *arthrocinèse*).

cinèse, caryocinèse, caryokinèse, division cinétique, mitose ◇ *karyokinesis* ◇ **kariokinez g., mitoz g.** Mod emrannañ ar gellig (sl. *caryocinèse, cinétique cellulaire, cycle cellulaire, cytocinèse, mitose*).

cinésialgie ◇ *kinesialgia* ◇ **fiñvost** b. Laur kigennoù da geñver ar fiñvoù, diwar freg ar c'haherwiennoù don.

1 cinésie, kinésie 2 -cinésie, -kinésie 3 cinési(o)-, kinési(o)- ◇ **1 kinesis 2 -kinesia 3 kinesi(o)-** ◇ **1 fiñval 2 fiñv, fiñv- 3 bevfiñv(-)** Fiñval, termen arveret : 1 e geriennoù evel *fiñval diac'hinek* (Gl. *cinésie paradoxale*), azon eus kleñved Parkinson. 2 E deveradoù evel *anfiñv, fiñvistead*. 3 En deveradoù arveret ent dibarek el Leuñvouriezh, evel *bevfiñvour* (Gl. *kinésithérapeute*) (sl. *akinésie, bradycinésie, cinèse, kinési-thérapie, Parkinson : maladie de* ~).

cinésiologie, kinésiologie ◇ *kinesiology* ◇ **Bevfiñvoniezh** Diskiblezh o studiañ ar bevfiñvoù en o c'heñver gant an Desavouriezh, ar Yec'hedouriezh, ar Yac'hadouriezh.

cinétique ◇ *kinetic* ◇ **1 fiñvek aa. 2 fiñvel aa. 3 korzhek aa. 4 korzhel aa. 5 korzhoniñ aa.** 1 Fiñv gantañ. 2 A-zave d'ar fiñv. 3 Gantañ korzh, eleze fiñv e ster ar Gorzhoniezh. 4 A-zave d'ar gorzh. 5 A-zave d'ar Gorzhoniezh.

1 cinétique, mouvement 2 cinétique ◇ **2 kinetics** ◇ **1 korzh b. 2 Korzhoniezh** b. 1 Teskad ar fiñvoù en un trevnad korfoù war gemm evel un aezhenn, ul liñvenn, un teskad sonnenoù. 2 Skourr a 'l Loc'honiezh oc'h ober gant mentadoù ar regad, ar pad hag an tolz, o studiañ ar c'heñver etre an nerzhoù arloet ha Fiñvoniezh an trevnadoù fizikel-kimiek.

cinétique d'un médicament, pharmacocinétique ◇ **pharmacokinetics** ◇ **1 korzh ul lia, liagorz b. 2 Liagorzhoñezh** 1 Devoned ul lia er bevedeg : ebarzhadur, kennevid, dasparzh dre amred ar gwad, gwered ar buzerioù, ezvevennadur. 2 Studi al liagorzhoù.

cinétique : équilibre ~ ◇ **kinetic balance** ◇ **mentel b. gorzh** Stad un trevnad fizikel-kimiek ma vez erlec'hiet enni da bep ampoent molekul nevez ouzh ar molekul dislec'hiet pe distrujet, e doare ma chom arstalek an niver anezho dre unanenn ec'honad.

cinétique : théorie ~ **des gaz** ◇ **gas kinetic theory** ◇ **arlakadenn b. gorzhoniñ an aezhennoù, Korzhoniezh an aezhennoù** Studi perzhioù an aezhennoù, diazezet war an dezrann stadegel eus korzh ar molekul, eleze eus al lavig anezho hag ar c'henstokoù etrezo e kement m'o deseller evel poentoù danvezel.

cinétique cellulaire ◇ **cellular kinetics** ◇ **korzhoniezh ar gellig** Termen leterc'hadek da arouezhiñ ar studi eus kenheuliad ha padelezh lankadoù nergor ar gellig, dedalvezet da amprouiñ an aozadoù enepkankrek (sl. *cinèse, cycle cellulaire*).

cinès-, cinét-

• *arthrocinèse* arzdefiñval • *ataxie cinétique ou dynamique, ataxie statique* ankedre diafiñvel, ankedre diasavel • *cholécystocinétique* bestlgellennvivaus • *énergie ciné-tique* gremm fiñvek .

cingulectomie ◇ **cingulectomy** ◇ **senklennezvenañ** Dazbidañ surjanel daoudu ar senklenn, ergemennet evit prederiañ psikozioù grevus 'zo, evit parraat ouzh an darwantusted pergen.

cingulotomie ◇ **cingulotomy** ◇ **senklennenbenañ** Distruj ar senklenn dre dredangaouediñ, ergemennet evel prederiadur al laurioù henek kilvers hag ar strafuilhoù fromel kevret.

cingulum ◇ **cingulum** ◇ **senklenn b.** Hordenn argromm a steuñvenn wenn loet war dalbenn diabarzh an div hanterenn empenn, kenere etre tolbezennoù tal hag ividig an empenn, o hañvalout c'hoari ur roll er fromerezh.

cintre cervico-obturator ◇ **Shenton's line** ◇ **gwarenn b. gouzoug-kaezour, linenn b. Shenton** Er skinwerañ, linenn argevek stummet gant ribl diabarzh gouzoug an askorn morzhed ha ribl izelañ barr traoñ an askorn kaezour; un torr enni zo un azon eus disvellad kammneuziad al lez.

circadian ◇ **circadian** ◇ **trozeziat aa.** A-zave d'ur pad a war-dro 24 h; ur *gorvez trozeziat* (Gl. *rythme circadien*) eo hini un anadenn o tistreiñ bemdez d'an hevelep eur pe dost, da skouer borc'hadur uc'hat ar c'hortizol etre 7 ha 10 h (sl. *chronobiologie, infradien, nycthémeral, ultradien*).

circadien : domaine ~ ◇ ◇ **trozezvan g.** Teskad ar c'horvezzioù a zo o zrovezh etre 20 ha 24 h.

circadien : système ~ ◇ ◇ **trozezvod g.** Teskad ar c'horvezzioù trozeziat a zo etrezo un ere arbennel pe a zo e dalc'h an un goubreder loet er bevedeg pe er-maez anezhañ (sl. *synchroniseur*).

circannien, circannuel ◇ **circannual** ◇ **trovloaziat aa.** A-zave d'ur pad a war-dro ur bloavezh.

circaseptidien ◇ **circaseptidian** ◇ **trozishuniat aa.** A-zave d'ur pad a war-dro seizh devezh.

circatrigintidien ◇ **circatrigintidian** ◇ **trodregonteziat aa., troviziat aa.** A-zave d'ur pad a war-dro tregont devezh.

circavigintidien ◇ **circavigintidian** ◇ **trouigenteziat aa.** A-zave d'ur pad a war-dro ugent devezh.

circiné ◇ **circinated** ◇ **kelc'hennek aa.** A-zivout anafoù elfennel a 'r c'hroc'hen e stumm gwarennoù kelc'h en dro da dachadoù a neuz vonan.

circinvolutions cérébrales ◇ **cerebral gyri** ◇ **troennoù l. (b.) an empenn** Parzhioù a 'r bluskenn empenn, *nantoù pluskenn* (Gl. *sillons corticaux*) ouzh o dispartiañ; etre *tolbezennoù* (Gl. *lobes*) emañ rannet an hanterennoù empenn dre *nantoù* don hag etre an *troennoù* emañ isrannet ar bluskenn dre *nantoù basoc'h*; an *dolbezenn dal* (Gl. *lobe frontal*) a ya pemp troenn d'he ober, en *dolbezenn gitem* (Gl. *lobe pariétal*) ez eus teir zroenn ha pemp en *dolbezenn ividig* (Gl. *lobe temporal*), c'hwec'h en *dolbezenn gilpenn* (Gl. *lobe occipital*), endra c'hoarvez an *enezenn* (Gl. *lobe de l'insula*, TA *insula*) a bemp troenn.

circinvolunt intralimbique ◇ **medial margin** ◇ **gwrimeñ b. greizel** Gwalenn voan a steuñvenn louet hag a wiennoù loet a-ziabarzh da droenn ar senklenn, oc'h enkel'hiañ ar furmadurioù etre-hanterennoù (korf karnek, freilhoù); ouzh he ober ez a 1) an *droenn dentek* (Gl. *corps godronné*, TA *gyrus dentatus*), funellad steuñvenn louet, 2) an *droenn rubanek* (Gl. *fasciola cinerea*, TA *gyrus fasciolaris*), 3) al *lindrenn louet* (Gl. *indu-sium gris*, TA *indusium griseum*), 4) ar *rizenn a-hed kreizel* (Gl. *nerf de Lancisi*, TA *stria longitudinalis medialis*) graet a steuñvenn wenn, 5) ar *stirad treuzveg* (Gl. *bandelette diagonale*) ha 6) *stirad Giacomini* (Gl. *ban-delette de Giacomini*) o klozañ an dro hag o tifourkañ en droenn dentek.

circinvolunt limbique ◇ **gyrus cinguli** ◇ **troenn ar senklenn** Gwalenn glok a steuñvenn louet oc'h amgaañ ar wrimeñ greizel, anezhi an *droenn lez-pennmarc'hig* (Gl. *circinvolunt de l'hippocampe*, TA *gyrus parahippocampalis*) pe T5 ha *troenn gentañ ar senklenn* (Gl. *première circinvolunt limbique, circinvolunt du corps calleux*), ganti ur roll en aroulevierezh ar flugez, ar c'hennevid hag an ervezhioù fromel.

circon-

• *abcès circonscrit* pugnez hevonn • *alopécie circonscrite* diwaoutad hevonn • *anévrisme intéressant la totalité de la circonférence d'une artère* darvoll o c'hoarvezout eus bolc'hadur trogelc'hiek un dalmerenn • *anneau complet de substance grise circonscrivant la circinvolunt intralimbique* gwalenn glok a steuñvenn louet oc'h amgaañ ar wrimeñ greizel • *bulles circonscrites et surélévements phlycténulaires* klogorennoù hevonn ha tosennoù filloc'hennek • *circinvolunt sous-calleuse, area subcallosa, aire(s) septale(s)* gorread endan-garne • *collections gazeuses ou liquides circonscrites* hogennadoù aezhel pe liñvel hevonn • *foyer circonscrit de nécrose ischémique* tachad kantet marvenn heskwadel • *les tumeurs bénignes sont circonscrites* hevonn e vez ar yoc'hennoù kuñv • *opacité circonscrite aux couches corticales* demerâd kantet e gwiskadoù ar gaenenn • *tumeur vasculaire circonscrite* yoc'henn wazhiedel hevonn.

circuit fermé ◇ **closed system** ◇ **amred g. kloz** Amred gwentañ trevnet evit un adenanañ holl el eus an aezhennoù ec'hanalet.

circuit ouvert ◇ **open system** ◇ **amred digor** Amred gwentañ trevnet evit an distaol holl el eus an aezhennoù ec'hanalet.

circuit semi-fermé ◇ **semiclosed systeme** ◇ **amred damgloz** Amred gwentañ trevnet evit un adenanañ darnel eus an aezhennoù ec'hanalet.

circulaires du cordon ◇ ◇ **punadennoù l. (b.) ar funig** Rolladur ar funig vegel en dro da c'houzoug ar grouell e-kerz ar gwilioud.

circulation ◇ **circulation** ◇ **amred g.** Dilec'hiadur ar gwad eus ar galon gleiz d'ar galon dehou (*amred bras* pe *amred trogorfat*, Gl. *grande circulation* pe *circulation systémique*) hag eus ar galon dehou d'ar galon gleiz (*amred bihan* pe *amred skeventel*, Gl. *petite circulation* pe *circulation pulmonaire*); en eil amred hag egile e tremen ar gwad dre an talmerennoù, ar c'horrwazhiend hag ar gwazhiennoù.

circulation extracorporelle ◇ **cardiopulmonary by-pass, extracorporeal circulation** ◇ **amredad g. ezkorfel, skoevad g. kalon-skevent, skoevredad g.** Keveladur eus an arc'hweliou kalon ha skevent dre amdreugañ ar gwad gwazhiennel en e bezh adalek argrec'h ar galon dehou betek ardraoñ ar galon gleiz diwar-bouez ur *galon-skevent kalvezadel* (Gl. *cœur-poumon artificiel*, Sz. *heart-lung machine*), ijinenn o c'hoarvezout eus un *oksigener*, ur *blomenn* hag ur *saniad adensinklañ* ar gwad oksigenet diouzh ur c'has hag ur gwask bonan; kalvezder arveret er surjianerezh war galon digor, dedalvezet ivez evit ar c'harzhañ ezlounezel dre al *lounezh kalvezadel* (Gl. *rein artificiel*, Sz. *artificial kidney*) ma vez neuze amdreuet ar gwad eus un dalmerenn d'ur wazhienn (sl. *hémodialyse*).

circu-

- *anticorps circulants* antikorf war amred, antikorf amredat
- *circuit de dérivation* amdreugad
- *circuit de réinjection* saniad adensinklañ
- *circuit fermé par les motoneurones gamma* amredenn furmet gant ar motoneuron gamma
- *circuit de réinspiration* treug an adenanañ
- *circuit ventilatoire* amred gwentañ
- *circulation croisée chez deux jumeaux hétérozygotes* amred gwad kroaziet etre daou c'hevell allvi
- *insuffisance circulatoire aiguë* skorted lemm an amred gwad, divig lemm an amred gwad
- *l'hémoglobine circulante* an hemoglobin war amred
- *la masse san-guine circulante* tolz ar gwad amredat
- *les bactéries circulantes de l'organisme* ar bakteri war amred dre ar bevedeg
- *les échanges respiratoires et nutritifs entre le sang circulant et les tissus irrigués* an eskemmoù analadel ha mezhuere etre ar gwad amredat hag ar gwiadou eroueriet
- *sous circulation extracorporelle* dindan skoev-redad
- *vitesse circulatoire normale ou accélérée* tizh reol pe vuiaet an amred gwad.

circumduction ◇ **circumduction** ◇ **1 kelc'haat 2 kelc'htuañ** 1 Fiñval un ezel o tresañ ur gemenn a zo he beg er c'henvell krec'h. 2 C'hwelañ al lagad en dro d'an ahel a-saezh (sl. *cycloduction*).

circumpilaire, péripilaire ◇ ◇ **tro-vlevenn** Loet en dro d'ur vlevenn.

cirrhogène ◇ **cirrhogenous** ◇ **kirroseiat aa.** A-zivout nep argerzh en araez da zec'han kirroz an avu.

cirrhose ◇ **cirrhosis** ◇ **kirroz g.** Stroll naouedoù a 'n avu naouus *ent neuziadurel* dre ur skleroz gwalennek ha muturnius tuet da hollekaat, displeberadur marvennek an avugelligoù hag azveradur adeiladezh an organ oc'h erlec'hiañ ouzh fipezennoù ar wagrenn nozelennoù "a adc'henezhadur", *ent klinikel* dre skorted henek arc'hweliou an avu, uswask ar wazhienn borzh (en orin an torliñv hag ar gwadliñvoù koazhadel); en etre 10 hag 20 % eus an degouezhioù ez evod ur c'harkinom avugelligel diwar anafou ar c'hirroz; arbennoù ar c'hirroz zo pistriel (alkoolel), tanijennel (avufioù), gwazhiedel (sl. *Budd-Chiari : syndrome de ~*), kennevidel (hemokromatoz, kleñved Wilson).

cirrhose alcoolique ◇ **alcoholic cirrhosis** ◇ **kirroz alkoolel** Seurtad kirroz liesañ e Frañs (80 % eus an degouezhioù), daou rizh dezhañ : 1) *isteñvus* (kirroz Laennec), naouus *ent neuziadurel* dre ar vezañs en avu eus greunennadoù arvelen (alese an dibab eus Gr. *kirrov* "rous" a reas Laennec evit luniañ anvad ar c'hleñved), *ent klinikel* dre un torliñv puilh hag un dedro marvus herrek, 2) *usteñvus*, ma vez muiadur ec'honad an avu e dalc'h gourc'hresk ar gwiad kenglenel.

cirrhose biliare, cirrhose cholestatique, cirrhose cholestatique ◇ **biliary cirrhosis** ◇ **kirroz bestel, kirroz bestl-anredel** Seurtad kirroz ma paota ar gwiad kenglenel e dianlen steviadur henek ar forzhioù bestl; peurliesañ e vez stanket ar *forzhioù ec'havuel* (grouanegezh dreist holl, kankr, ilgreizfo pe bestlsanfo henek); dibaotoc'h e vez ar steviad war ar *forzhioù enavuel* (sl. *cirrhose biliare primitive*); en nevezc'hanidi e vez devoudet ar c'hirroz bestel gant kammeuziad pe ezvezañs ar forzhioù bestl; da azonoù dezhañ e vez usvent an avu hag ar felc'h, iker ha terzhienn alies, uswask porzhel a-wechoù.

cirrhose biliare primitive, cirrhose ou maladie de Hanot-Mac Mahon, cirrhose biliare xanthomateuse, ictère cholestatique chronique par cholangiolithe et péri-cholangiolithe ◇ **primary biliary cirrhosis, xanthomatous cirrhosis** ◇ **kirroz bestlel kentael, kleñved Hanot-Mac Mahon, kirroz bestlel ksantomatus** Naoued avu dibaot, o teraouiñ asil goude pemont vloaz gant ar merc'hed peurliesañ, da azon kentañ dezhañ un debron ha, da heul, un iker henek doues pe douesoc'h, terzhienn, troazhvestlegezh ha livrezh reol an oulennoù, un avu tev ha kalet, ur felc'h usventek, ur gwadusvec'h bilirubin, kolesterol, lipid hollel ha fosfatazoù alkaliel; e-kerz an dedro emdarzh, marvus bepred dindan 5 bloaz ent keitat, e tinod ksantomoù kroc'hen, misug, dirazekaat, uswask porzhel; ar prederiadur nemetañ eo treuzplantadur an avu; dianav eo an arbenn : kevarguziñ a reer ur wikefre unanhangaeel, un tizhad viruzel, un orin hilel.

cirrhose bronzée ◇ **pigmentary cirrhosis** ◇ **kirroz staenek, kirroz livegennus** Lec'hiadur avu an hemokromatoz kentael, naouus dre ur c'hirroz *usteñvus* kevret gant un ensiladur livegennoù houarnin en avu hag er flugez all, ur melanoderma hollek hag un diabet c'hwec peurliesañ (sl. *hémochromatose primitive, sidérose hépatique*).

cirrhose carentielle ◇ **nutritional deficiency cirrhosis** ◇ **kirroz negezien** Klañvadur paot en Azia (*kirroz India*) hag en Afrika (*kwashiorkor*), o tizhout ar vaband nevezdizonet ha roet dezho boued re baour a brotid loenel, naouus dre strafuilhoù koazhadel, dilerc'h diorren ha divigad bredloc'hadel, gouliñvoù, un avu tev, behinek da gentañ, sklerozek da c'houde hag un dedro grevus.

cirrhose hypertrophique graisseuse, cirrhose alcool-tuberculeuse ◇ **fatty cirrhosis** ◇ **kirroz usteñvus behinek, kirroz alkoolel-torzhelek** Kirroz o tizhout an dorzhelleion alkoolek, naouus dre un avu tev ha gwiridik, hep usvent ar felc'h na gouliñv, o tedreiñ herrek gant terzhienn, treutadur, skorted avu ha marv dindan 2 pe 3 miz.

cirrhose post-hépatitique, atrophie jaune subaiguë ou subchronique du foie, cirrhose atrophique subaiguë, cirrhose post-nécrotique ◇ **post hepatitis cirrhosis** ◇ **kirroz dianavuo, kirroz isteñvus goulemm, kirroz dianvarvennad** Kirroz o teraouiñ da heul un avufo viruzel, kerkent pe gant un dale o vont betek 5 pe 10 vloaz, naous *ent neuziadurel* dre isteñv ha disliv an avu, dre ar genvezañs eus anafoù marvennel, nozelennoù adc'henezhadur kelligel ha dinod ur skleroz, *ent klinikel* dre un ikter, gwadliñvoù, ur purpura hag ur gouliñv; o tedreiñ etrezek ar skorted avu marvus; amplegad an dreistbevañ eo an treuzplantadur.

cirrhotic ◇ **cirrhotic** ◇ **1 kirrozek aa. 2 kirrozeg g. -eion 3 kirrozus aa. 4 kirrozel aa.** 1 Gant ar c'hirroz. 2 Gouziviad ar c'hirroz. 3 O tec'h an ar c'hirroz. 4 A-zave d'ar c'hirroz.

cirscèle ◇ **cirsocele** ◇ **kirsokel g.** Usvoll teuc'hellek gwazhiennoù kroc'hen ar gousac'h.

cirsoïde ◇ **cirsoïd** ◇ **kirsoïdel aa., teuc'hellek aa., teuc'hellvanek aa.** Heñvel ouzh an teuc'helloù (sl. *anévrisme cirsoïde*).

cisaillement ◇ **shear** ◇ **gweltreañ, gourzhibreñ** Rannañ ur pezh e div grennenn dre ober dezho riklañ an eil ouzh eben hervez plaenenn ar skejañ dre wered daou nerzh kenstur ha gindu.

ciseau ◇ **1 chisel 2 scissors** ◇ **1 kizell b. 2 sizailh b.** 1 Benveg plat, dezhañ un dremm droc'hus, arveret e surjianerezh an eskern evit erlemel, benañ, skejañ un imboudenn pe un drailh askorn, embreget gant an dorn hepken pe dre skeñ warnañ gant ur morzhol. 2 Benveg graet gant div lavnenn vetal kroaziet ha kenstaget dre ur paoell en o foent kroaziañ, dezho en ur penn pep a lagadenn ma sanker ar bizied ha, war un darn anezho diwar ar penn all, pep a zremm droc'hus gant ur beg ront pe lemm, arveret er surjianerezh evit skejañ, gouvenañ, amnaziñ, dasfregañ ar parzhioù meizh.

cisternal ◇ **cisternal** ◇ **oglennel aa.** A-zave da oglennou an empenn, frankaennoù ar gavenn endan-gevniked.

cisternite ◇ **cisternitis** ◇ **oglennfo g.** Pilhonfo lec'hiet e frankaennoù ar gavenn endan-gevniked.

cisternographie ◇ **cisternography** ◇ **oglennluniñ** Skinluniñ oglennou diaz ar c'hloppenn goude ensinkladur aer pe ul liñvenn Xdemer; en *oglennluniñ izotopek* ez ensinkler un tieller skinoberiek dre an hent endan-gilpenn.

cisternotomie ◇ **cisternotomy** ◇ **oglennenbenañ** Digeriñ surjaniel oglennou diaz ar c'hloppenn hag ar c'histoù endan-gevniked pa vez anezho.

cistron ◇ **cistron** ◇ **kistron g.** Stroll kodonou a zo en o dalc'h enaozadur ur protein, pep kodon o tesavelañ unan eus an amindrenkennoù a ya d'ober ar protein; *kistron* eo an anvad a roer d'ar *c'henenn* en diarsell arc'hwelel (sl. *codon, gène, exon, muton, opéron, recon*).

citerne de Pecquet ◇ **cistern of Pecquet, cisterna chyli (TA), chylocyst** ◇ **oglenn ar sugenn** Frankaenn sac'hheñvel loet e penn deroù san ar brusk, o tisoc'h eus kember an daou gef dargreiz.

citernes cérébrales ◇ **cerebral cisterns** ◇ **oglennou l. (b.) an empenn** Frankaennoù ar gavenn endan-gevniked, enni liñvenn benn-kein, loet e lec'hiennoù diseurt : *oglenn ar c'hogn pont-ilpenn* pe *oglenn ar poull kostezel* (Gl. *citerne de l'angle pontocérébelleux*), *oglenn gwazhienn vras an empenn* (Gl. *citerne circumpédonculaire*), *oglenn etre-troadou* (Gl. *citerne inter-pédonculaire*), *oglenn rak-hirvel* (Gl. *citerne prébulbaire*), *oglenn vras* (Gl. *grande citerne*).

citrine ◇ **citrin** ◇ **kitrin g.** Aozad douhennet eus ar suraval, anezhañ ur meskad flavonou, dezhañ ur gwered vitamin P (pe C₂), o reoliñ kresk ha forzhegezh ar c'horrwazhied; klokaat a ra gwered an drenkenn askorbek.

citruilinémie ◇ **citruilinaemia** ◇ **1 gwadkitrullinegezh aa. 2 gwadvec'h g. kitrullin, kitrullinwadvec'h g.** 1 Kleñved hêzezel e dalc'h un divigad argininosukinat-sintetaz, enzim o tasperzhiañ e kor an urebarañ dre drezufurmiñ ar c'hitrullin e trenkenn argininosukinek, naous *ent vevoniel* dre ar vezañs er gwad eus un amindrenkenn, ar c'hitrullin, *ent klinikel* dre azonou breidel (dilerc'hegezh), nerval (glizi), koazhadel (barrou c'hwelñ) ha dre resmiadoù koma diwar wadusvec'h amoniak (sl. *ammonémie*). 2 Feur ar c'hitrullin er gwad.

citr-

- *citratémie, présence de citrates dans le sang* gwadkitrategezh • *citratémie, taux de citrates dans le sang* gwadvec'h kitratou, kitratwadvec'h • *citaturie, présence de citrates dans l'urine* troazhkitrategezh • *citaturie, taux de citrates dans l'urine* troazhvec'h kitratou, kitratroazhvec'h • *citrimie, présence d'acide citrique dans le sang* gwadkitregezh • *citrimie, taux d'acide citrique dans le sang* gwadvec'h trenkenn gitrek, kitrekwadvec'h.

clairance ◇ **clearance** ◇ **dizeul g.** Gwezhiader karzhadur ar plasma : keñver etre tolkas ezvevennañ un danvezenn diouzh ur c'hombod dourennel lavaret hag ar bec'h anezhi er plasma; e-keñver Mentawouriezh, ez eo an dizeul rannad an *tolzkas* (Gl. *débit en masse*) MT⁻¹ dre un *ec'honvec'h* (Gl. *concentration volumique*) ML⁻³, kevatal enta d'un *ec'hongas* (Gl. *débit en volume*) L³T⁻¹; dewerzhed e vez e mililitroù dre vunud (mL/min).

clairance rénale ◇ **renal clearance** ◇ **dizeul lounezhel** Keñver etre tolkas troazhañ un danvezenn hag *ec'honvec'h* an danvezenn-se er gwad, eleze niver ar mililitroù plasma a c'hell al lounezh peurgarzhiañ diouto an danvezenn dre vunud; da skouer, dizeul lounezhel an urea (pe, berroc'h, *dizeul an urea*) zo, gant an oadour reol, etre 40 hag 80 mL/min — eleze, lavarout ez eo dizeul an urea par da 50 mL/min, zo kement ha lavarout e vez al lounezhi o karzhañ *dre vunud* un tolz urea par d'an hini a zo bezant e 50 mL/min plasma; dedalvezet e vez keal an dizeul da studi arc'hwelerezh organoù all, evel an avu (*dizeul avuel ar bromosulfotalein*), ar skoedenn (*dizeul skoedennel an iod*), ar mel eskern (*dizeul mel an houarn*).

clair-

- *alopécie en clairière* diwaoutad frankizennek • *l'aspect clair des cytoplasmes* neuz sklaer ar c'hitoplasmou • *une clairance de l'eau libre positive* un dizeul muiel an dour rez.

clamp ◇ **clamp** ◇ **klamp** g. Benveg surjianerezh e stumm ur c'hevel, dent disramp hag andaraezus ouzh e javedoù, un draen harz ouzh e barraat a ziserrin, arveret da anforzhañ an organ kleuz a skejer, sk. : *klamp gwazhiedel* (Gl. *clamp vasculaire*), *klamp koazhadel* (Gl. *clamp digestif*).

clampage ◇ **clamping** ◇ **klampañ** Desezañ ur c'hlamp ouzh ur wazhiedenn pe ur flugezenn a venner anforzhañ, a-raok pe goude he digeriñ.

clangor, bruit clangoreux ◇ **clang tint** ◇ **stirilh** g. Tregern vetal eus eil trouz ar galon er selaouennva aortek, test eus un displeberadenn e speur us-sac'hell an aortenn.

clapier ◇ **abscess with several orifices and a bad drainage** ◇ **linogenn** b. Hogennad lin na denn ket da wehenniñ ha dezhi lies toull diskarg.

clapotage ◇ **clapotage** ◇ **flokata** Kiziata speur ar c'hof war-benn andalañ, diwar an trouz a glever, derez dardenn an organoù kleuz (stomok, pervez).

claquage musculaire ◇ **strain of muscle** ◇ **trastennañ kaher, trastenn** g. **kaher** Dardennañ ar c'haherwiennoù o vont betek o fregañ (sl. *elongation*).

1 claquement 2 claquade, clapping ◇ **1 tapping 2 clapping** ◇ **1 palvadiñ 2 stlafañ** 1 Kalvezder leuñviñ, anezhañ skeiñ palv an dorn ouzh ur parzh korf. 2 Palvadiñ speur ar brusk war-benn dispegañ borc'hadennoù ar bronkez.

claquement artériel protosystolique, bruit d'éjection, clic d'éjection ◇ **click of ejection** ◇ **stlak** g. **talmerel deroù-sistol, stlak** g.. **an diflitr** Trouz krenn ha berrbad en 2^e tachad etre-kostoù kleiz hag o c'hoarvezout etre 5 ha 7/100 s goude deroù an trouz kentañ, azon eus usvoll an aortenn pe an dalmerenn a-skevent, e dianlen un isvoll trapig peurliesañ.

claquement valvulaire, clic(k) ◇ **valvular snap** ◇ **stlak trapigel** Trouz krenn ha berrbad, kreñvadur ur gedrann eus kentañ pe eil trouz ar galon da geñver serridigezh pe digoridigezh an trapigoù; termen genadel arveret e daou zegouezh dreist holl : 1) *stlak an diflitr deroù-sistol*, a glever pa zigor trumm ar sac'hellou kornloarek aortenn pe a-skevent (sl. *claquement artériel protosystolique*), 2) *stlak an digeriñ mintrek* (Gl. *claquement d'ouverture de la mitrale, COM, Sz. opening snap*), er 4^e tachad etre-kostoù kleiz, e deroù an diastol, diouzhtu goude eil trouz ar galon, klevet hogos bepred pa vez isvoll mintrek.

Clar : miroir de ~ ◇ **Clar's frontal mirror** ◇ **melezour** g. **Clar, melezour tal** Benveg imbourc'hiñ arveret er Skouarnfrigarloc'hennouriezh (SFG) dreist holl, o c'hoarvezout eus ur melezour argevek durc'hadus, outañ en e sti ur glogorenn dredan vihan hag ennañ toullou dirak daoulagad an arseller.

clarification ◇ **clarification** ◇ **boullaat** Treuzfurmiñ ul liñvenn leidek diforzh en ul liñvenn voull; dre astenn ster e reer *parenn voullaat* eus an danvezennou evel al lipoprotein-lipaz o tiwanañ er bevedeg goude sankadur heparin hag en araez da voullaat ur gwadvez aet laezhek dre berzh un dreistkarg triglikeredoù.

clar-
 • *capable de clarifier un sérum lactescent par surcharge de triglycérides* en araez da voullaat ur gwadvez aet laezhek dre berzh un dreistkarg triglikeredoù • *facteur clarifiant* parenn voullaat • *image radiographique d'une bronche sous forme d'une clarté au sein d'une opacité* skeudenn skinlineuñ ur vronkezenn e rezh ur roudenn sklaer adreuz d'un demerenn.

clastomatose ◇ **clastomatosis** ◇ **klastomatoz** g. Anadenn o c'hoarvezout gant ar plasmokit : ur vroñsenn gitoplasm o tevaat, o tistagañ diouzh ar gellig hag o tilaoskiñ he endalc'had er metoù tro-dro.

classe économique : syndrome de la ~, syndrome de la station assise prolongée, phlébite du transport ◇ **economy class syndrome** ◇ **azoniad ar c'hlas arboellat, azoniad an hirgoazez, gwazhiennfo** g. **an dezougen** Darvoud ar beajoù aerdreizher ma rank arvalion ar c'hlas arboellat chom azezet e-doug eurvezhioù; e dalc'h gorrekadur amred distro ar gwad e c'hoarvez anaezioù o vont eus ar gouliñ en o zreid d'an tromboz gwazhiennel en o divc'har ha betek an enfrou skevent.

class-
 • *classe des Cestodes* kevrennad ar C'hestod • *classer* rummañ, rummata • *classer dans une typologie* rizehennañ • *classification d'Angle* rummadur Angle • *classifier* rummañ, rummata • *classification des granulocytes* rummadur ar granulokit • *le fait pour une substance de ne pouvoir être classée parmi les hormones* anrummadusted un danvezenn evel hormon.

clastogène ◇ **1 clastogenic 2 clastogene** ◇ **1 darneiat** aa. **2 darneiad** g. 1 A-zivout an danvezennou kimiek a ra d'ar c'hromozomoù terriñ. 2 Danvezenn darneiat.

clastique ◇ **clastic** ◇ **brevadel** aa. A-zave d'ar realoù kleñvedel naous dre an doug da zistrujañ traezoù.

1 3 clastomaniaque 2 clastomane ◇ ◇ **1 brevvariat** aa. **2 brevvariad** g. **-ed 3 brevvairel** aa. 1 Gant ar brevvar. 2 Gouzviad ar brevvar. 3 A-zave d'ar brevvar.

clastomanie ◇ ◇ **brevvar** g. Doug darluskel pe mac'hennel gant kleñvion 'zo da zistrujañ an traezoù a gavont en dro dezho.

Claude Bernard-Horner : syndrome de ~ ◇ **Bernard-Horner syndrome** ◇ **azoniad Claude Bernard-Horner** Azoniad diwar sezi untu reizhiad simpatek ar gouzoug, anezhañ, a-gendu, mabisvoll, enkadur faout ar malvennoù gant gaouislink, dreklagadegzh ha, hogos bepred, strafuilhoù gwazhiedloc'hadel al leddremm (c'hwezadur, muiadur gwrezverk ar voc'h); e degouezhioù 'zo emañ an azoniad e dalc'h anafoù an hanterennou empenn hag an hirvel.

claudication, boiterie ◇ **limp, limping, claudication** ◇ **klefiñ, klofadur** g., **kammañ, kammerezh** g. Kerzhout en ur stouñ digemparzh ar c'horf.

claudication intermittente ◇ **intermittent claudication** ◇ **klefiñ spanaus, kerzhlaour spanaus** Kammerezh laurus o tarvezout goude kerzhout un nebeut munodoù, o steuziañ gant ar paouez, oc'h adfeilhañ gant pep adkrog kerzhout.

claudication intermittente ischémique, syndrome de Bouley-Charcot ◇ **Charcot's syndrome, angina cruris, dysbasia angiospastica, dysbasia angiosclerotica intermittens** ◇ **klefiñ spanaus heskwadien, azoniad Charcot, kevenkez g. an divesker, migerzh g. diwar wazhiedandag, migerzh spanaus diwar skleroz ar gwazhied** Klefiñ spanaus diwar isforzh talmerennoù an izili traoñ dre an ateroskleroz; ar gouziviad a rank chom a-sav goude un herrad kerzhed en askont ma stag e zivesker da vorzañ, da reudiñ ha da lauriñ, diaezoù a steuz goude ur pennadig diskuizh.

claudication intermittente médullaire, claudication intermittente spinale ◇ **intermittent spinal claudication, transient spinal ischaemia** ◇ **klefiñ spanaus a-livenn, heskwad g. tremeniat a-livenn** Ponnerded ha gwanded o tont en divesker gant ar c'herzhed, hep laur nepred, kevret gant un usdamoug; azoniad dezhañ lies arbenn gallus : amwask ar gwriziennoù nerverl, isvoll kanol an dargreiz, treuzseizi en e zeroù, treuzseizi Erb pergen.

clauumatographie ◇ ◇ **gwic'hwezañ** Lerc'hwezañ kevregat garmoù ar maban.

claustrophobie ◇ **claustrophobia** ◇ **klozarur g.** Arur al lec'hioù kloz (pignerezed, karbedoù, skeudennvaou)

1 3 claustrophobique 1 2 claustrophobe 1 claustrophobic ◇ **1 klozarurek aa. 2 klozarureg g. 3 klozarurel aa.** 1 Gant ar c'hlozarur. 2 Gouziviad ar c'hlozarur. 3 A-zave d'ar c'hlozarur.

claustrum (TA) ◇ **claustrum** ◇ **kael b.** Lavnenn steuñvenn louet parzhek e gronnoù diaz an empenn, loet etre ar pourc'had eizhañ en diavaez hag ar gronn ferek en diabarzh.

clava, tubercule du noyau gracile (TA) ◇ **gracile tubercle** ◇ **torzhell b. ar gronn moan** Bolc'hadenn lezkreizer adreñv loet e lodenn uhelañ tal adreñv an hirvel, agetver gant ar gronn moan.

clavelée, variole ovine ◇ **sheeppox** ◇ **brec'h b. an deñved** Kleñved tredizhus diwar ur poksvirus azonet dre an derzhienn hag un dispuilhad burbuennek, na vez ket treuzkaset d'an den peurliesañ.

clavicule ◇ **clavicle** ◇ **trebez g.** Askont oc'h ober parzh arak gouriz an ezel krec'h, loet etre ar glerenn hag ar planken skoaz.

cléidectomie ◇ **cleidectomy** ◇ **trebezezenañ** Dazbidañ un darn pe an holl eus an trebez.

cléidotomie ◇ **cleidotomy** ◇ **trebezenbenañ** Skejañ surjanel trebez ar grouell, embreget da getver an ezvountañ warbenn leiaat an treuzkiz divgerskoaz pa vez mieskor an divskoaz.

-cléisis

- *colpocléisis* gouinanforzhañ.

cliché

- *cliché obtenu par bronchographie* bronkez-lunad, bronkezlun • *cliché radiographique* skinlunad, skinlun • *cliché tomographique* skinerlunad, skinerlun.

clichement ◇ ◇ **chilhañ** Si distagañ ar c'hwibanennoù ([s], [z], [ʃ], [ʒ]), anezhañ ouzhpennañ outo ur stavenn [λ], sk. : *cher* distaget, n'eo ket [ʃer], met [ʃλer].

click, clic ◇ **click, snap, snapping** ◇ **stlak** Trouz trapigoù ar galon pa zigoront pe pa serront (sl. *claquement valvulaire*).

clignement ◇ **blinking** ◇ **gwilc'hañ** Argrezañ prim andiarvenn kigenn gelc'hennek al lagad oc'h ober d'ar malvennoù serrif ur predig; pa vez graet diarvenn e lavarar kentoc'h *blinkañ, gwignal* (sl. *blépharospasme, blépharotie*).

climalyse, accommodation ◇ **accommodation** ◇ **argevreadañ** Keal arveret en tredandeznaouiñ : azasaat an nervwienn diouzh argresk ar read tredan; seul vihanoc'h naou an argresk, seul vrasoc'h ar *read gwehin* (Gl. *intensité liminaire*); dindan ur werzh savelet eus an naou, anvet *naou bevennat* (Gl. *pente limite*), ne c'hoarvez mui ar broudañ (sl. *accommoda-tion : constante d'~*).

climatère, ménopause, retour d'âge ◇ **menopause, change of life, climacterium, menolipsis** ◇ **oad g. eizik, eizikvan b., klimakter g.** Bloavezhioù eus ar vuhez ma c'hoarvez ar paouez mizioù.

climatérique ◇ **climacteric** ◇ **eizikvanel aa., klimakterek aa.** A-zave d'an oad eizik.

climatologie ◇ **climatology** ◇ **1 Hinadouriezh b. 2Hinnevedouriezh b.** 1 Studi an hinadoù. 2 Studi gwered an hinadoù war yec'hed an den.

climatopathologie ◇ **climatopathology** ◇ **Hingleñved-ouriezh b.** Rann eus an Hinnevedouriezh o plediñ gant kleñvedusted an hinadoù war ar bevedeg; komz a reer a *Hingleñvedouriezh trovanel, bleinel, gouelec'hel*, h.a. (sl. *météoropathologie, cosmopathologie, telluropathologie*).

clima-

- *cure climatique* kur hindrev, hingur • *mesures climatiques, diététiques et occupa-tionnelles* diarbennoù hinvael, bouedel ha breadel • *station climatique* hindrev, hinva.

clinique ◇ **1 2 3 clinic 4 clinic, clinical** ◇ **1 2 3 klinik g. 4 klinikel aa.** 1 Studi rageun ar glañvourion (ent klasel : “e-tal o gwele”) hep amoug an erc'hwilioù klokaat (pe imbourc'hioù amglinikel, Gl. *examens complémentaires* pe *paracliniques*). 2 Teskad an anaoudegezhioù dastumet dre ar studi-se. 3 Kelennerzh an anaoudegezhioù-se. 4 A-zave da studi rageun ar glañvourion.

clinique ◇ **clinic** ◇ **klinikenn** b. 1 Gwazrann ospital ma vez studiet ha kelennet ar c'hlinik. 2 Kurdi, prevez peurliesañ, ma prederier klañvourion gweleat pe valeat.

clinique : **examen** ~ ◇ **clinical examination** ◇ **imbourc'h** g. **klinikel** Prantad kentañ an imbourc'h mezegel, lies lankad ouzh e ober, ent klasel : 1) atersañ war 1a) diagentoù personel ha familhel ar gouziviad, 1b) ar strafuilhoù arc'hwelel gouzañvet gantañ (ar paz, ur pistig), 1c) an arouezioù hollek (an derzienn, ar skuizhvez); 2) erc'hwiliañ korf ar gouziviad dre bevar hent : 2a) ensellout, 2b) teuta, 2c) kiziata, 2d) selaouennañ.

clinique : **tableau** ~ ◇ **clinical pattern**, **clinical picture** ◇ **taolenn** b. **glinikel** Teskad an azonou hag an arouezioù dastumet dre an imbourc'h klinikel.

clinique

• *chef de clinique* penn klinik • *diabète clinique* diabet klinikel • *infection clinique* poread klinikel • *méthode anatomoclinique* hentenn neuzklinikel • *signes cliniques* arouezioù klinikel • *syndrome radioclinique* azoniad skinklinikel.

clinocéphalie ◇ **clinocephalism** ◇ **klopenndibregezh** b., **klopenndibr** g. Kammneuziad ar c'hlopenn, anezhi arblated ar parzhioù tal, ividig pe gitemn, o reiñ d'ar volzpenn stumm un dibr.

clinodactylie ◇ **clinodactylism** ◇ **bizfleegezh** b., **bizfle** g. Stouadur war gostez eus eizhaenn un pe lies biz (dorn pe droad), e dianlen un arzad pe un angrizad stirenn pe lientstirenn; a-wechoù e vez ganedigel, hilampegadek (sl. *brachyclinodactylie*).

clinomanie, **lectuarisme**, **manie lectuaire** ◇ **clinomania** ◇ **gourvezvar** g. Tech mac'hennel da chom gourvezet.

clinophilie ◇ **clinophilia** ◇ **gweleegezh** b. Tech kleñvedel da chom er gwele; daoust ma ra aozerion 'zo kensterioù eus an daou dermen, ez eo spisoc'h lakaat kemm etre ar *weleegezh*, stadet e-touez azonou bredanaezioù diseurt (gouvidoù, psikozioù, psikasteniez), hag ar *gourvezvar*, erzerc'had eus an neuroz mac'hennel.

clinostatique ◇ **clinostatic** ◇ **gourvezel** aa. A-zave d'al loadur a-c'hourvez (sl. *orthosta-tique*).

clinostatisme ◇ **clinostatism** ◇ **1 gourvezelezh** b. **2 gourvezegezh** b. 1 Loadur a-c'hourvez. 2 Teskad an anadennoù diwar al loadur ac'hourvez.

clino-

• *bradycardie clinostatique et hypotension orthostatique* istead kalon gourvezel hag iswask warsavel • *modifications physiologiques provoquées par le clinostatisme* daskemmoù bevedel e dianlen ar c'hourvezelezh.

clitoridectomie ◇ **clitoridectomy** ◇ **elligezenañ** Dilemel surjaniel an ellig.

clitoris ◇ **clitoris** ◇ **ellig** g. Organ sonnidik furmet diwar kenuniañ ar c'horfoù keviaouek benevel ha loet e parzh araok ar c'hourzh.

cleavage ◇ **cleavage** ◇ **disfaoutañ**, **disfaout** g. 1 (Fizik) dazrannañ ur strinkenn pe ur veinenn hervez talennoù brientek (talennoù disfaout). 2 (Surjianerezh) disrannañ daou organ pe daou furmadur hervez ur gwele naturel pe un dalenn araezus.

clivage : **syndrome de** ~ ◇ **anterior chamber cleavage syndrome** ◇ **azoniad disfaout ar gambr araok** Teskad kammneuziadoù diwar wariadennoù an diorren rizhellel eus rann araok al lagad (lersae, kormsae, kanevedenn, lavnenn vevennus adreñv) (sl. *embryotoxon*, *glaucome congénital*).

clivus ◇ **clivus** (TA) ◇ **naou** g. Gorreenn askorn war zinaou a ya kein an dibr d'ober he lodenn grec'h araok ha rann diazpenn an askorn kilpenn d'ober he lodenn draoñ adreñv; warni emañ loet ar c'hef empenn hag ar pont.

cloaque ◇ **cloaca** ◇ **kloak** g. Kanol rizhellel endoblastek a ya, goude bezañ tilhennet gant ar gennenn gloakel, d'ober ar god troazhañ-genel a-ziaaraok, ar youlc'h a-ziadreñv.

cloison des fosses nasales ◇ **septum of nose** ◇ **tilhenn** b. **ar fri** Tilhenn askorn-migorn a-saezh ha kreizer etre div gavenn ar fri.

cloison interauriculaire ◇ **atrial septum** ◇ **tilhenn etre-kentezoù** Lienenn voan o tispartiañ an daou genter, war he zalbenn dehou ur bukadenn, ar *poull vigelc'hiek* (TA *fossa ovalis cordis*), en dro dezhi ur ribl gwarennec, *gwrimenn ar poull vigelc'hiek* (TA *limbus fossae ovalis*), ha war he zalbenn kleiz ar *pleg kornloarek* (TA *plica semilunaris*) hag ar *poullig rak-tilhenn* (Gl. *fossette préseptale*).

cloison interauriculo-ventriculaire ◇ **atrioventricular septum** ◇ **tilhenn genter-kofig** Tilhenn lienennec etre ar c'hentez dehou hag ar c'hofig kleiz.

cloison interventriculaire ◇ **ventricular septum** ◇ **tilhenn etre-kofigoù** Tilhenn gigennek tev etre an daou gofig.

cloison recto-vaginale ◇ **rectovaginal septum** ◇ **tilhenn youlc'h-gouin** Ledad moan gwriad kellaouek etre ar youlc'h hag ar gouin adalek ar c'harbedenn betek ar c'hleuz youlc'h-krozh.

cloison : **déviation de la** ~ ◇ **nasal septum deviation** ◇ **gwariad** g. **an dilhenn**, **kammad** g. **an dilhenn** Ezreolder korfadurel ganedigel pe diandaraez, anezhañ distummad tilhenn ar fri en he lodenn askornek pe en he lodenn vigornek, o tevoudañ steviadur darnel pe hollel an eil kavenn pe eben, pe an div.

cloison : **reposition de la** ~ ◇ **septum reposition** ◇ **addesezañ an dilhenn** Gwezh surjaniel amkanet da lakaat tilhenn ar fri en he savlec'h reol, a-saezh ha kreizer.

cloison : résection de la ~ ◇ **septum resection** ◇ **dazbidañ an dilhenn** Dilemel surjanel lodenn adreñv, askornek, tilhenn ar fri war-benn muiaat kavvez ar c'havennoù fri ha dre se o heforzhded.

clomifène : test au ~ ◇ **clomifene test** ◇ **erwezh g. ouzh ar c'hlomifen** Prouad amkanet da erc'hwiliañ gouested kreizennoù ar gouzerc'hvel da elloiñ borc'hadur ar gonadostimulineer gant ar c'hougorfenn; talvout a ra, pa vez bonan ar viereziou hag an enkrozhenn, da c'houzout ha devoudet eo angwezh ar rakgougorfenn gant un direizh anezhi pe gant un diouer kentraouiñ a-berzh ar gouzerc'hvel; un aozad kevanaou estrogendolc'her eo ar c'hlomifen.

clonage ◇ **cloning** ◇ **kloniñ** Gwezhañ hilouriezh anezhañ dedaoliñ ur c'hlon, eleze diwar ur patrom unel, un teskad *eiladoù unrezh* piaouer d'an un glad hilel; pa wezhier war gelligoù, ez erlamer ur graoñell diploidel diouzh ur rizhell er bazenn blastula hag en he imboudet war ur vi nevezfrouezhiget bet didennet e graoñell dioutañ; ar c'helligoù merc'h hag ar bevion o teverañ diouzh ar vi oberetaet a vo dezho holl an un glad hilel, hini ar graoñell imboudet; *kloniñ ur c'henenn* zo kement ha liesaat eiladoù un tammad DNA.

clonal ◇ **clonal** ◇ **klonel** aa. A-zave d'ur c'hlon.

clone ◇ **clone** ◇ **klon** g. -où Teskad hiniennoù pe kelligoù evodet dre ouennañ anrevel diouzh an un hinienn pe diouzh an un kellig, dezho an un glad hilel.

clone dominant ◇ **dominant clone** ◇ **klon trec'hek** Stroll kelligoù hilunglad muianiverek en un hollad graet gant lies gread kelligoù.

clonie, myoclonie ◇ **clonic convulsion, myoclonia, myoclonus** ◇ **krid g., argrezad g. kridek** Argrezad andiarvenn trumm ha berbad en ur rann gigenn, ur gigenn pe ur stroll kigennoù, naoues er c'hahervarwezañ dre un disvec'h 1–10 mV 20–60 ms.

clonisme, convulsion clonique ◇ **clonism** ◇ **kridegezh** b. Glizi naoues dre argrezadoù kridek o tarvezout a voleadoù herrek.

clonus, trépidation épileptoïde ◇ **clonus** ◇ **gougrid g., brac'hitel b. (droukfellvanek)** Argrezañ korvezek ur gigenn pa vez dalc'het war zehed, anadenn stadet er gigenn bevarfennek (*gougrid ar padelleg*) pe e kigenn drifennek ar c'har (*gougrid an ufern, gougrid an troad*), azon un anaf er stirad pikernennek.

cloni-

- *blépharospasme tonique ou clonique* malvennandag tantek pe kridek
- *contracture clonique* dargrezad kridek
- *accès de contractions saccadées, ou clonies* barrad argrezadoù a-stroñs, pe kridoù.

clou ◇ **nail** ◇ **tach** g. Garenn reut metal a sanker er gavenn vel evit arzerc'hel en o lec'h reizh an tammoù eus un askorn torret (*kesteudañ dre enibiliañ pe dre enklaviañ*), arveret dreist holl da gesteudañ an eskern hir dezho ur gavenn vel ledan (askorn morzhed, skin).

clou hémostatique, clou plaquettaire, thrombus blanc, thrombus primaire ◇ **haemostatic white thrombus, white plug** ◇ **broch g. gwadkae, broch gwenn, broch pladanel, trombus g. gwenn, trombus kentael** Dazad pladanoù furmet da geñver ar gwadkaeñ kentael, o skoilhañ ouzh ar gwadliñvañ diwar ur freg gwazhiedel bihan.

clou-plaque ◇ **plate-nail** ◇ **tach-plakenn** Stignadell o kevrediñ un tach hag ur blakenn doullaouet, arveret da gesteudañ torroù gouzoug an askorn morzhed; biñsañ a reer ar blakenn ouzh talbenn diavaez an askorn ha festañ outi an tach sanket dre al lodenn grec'h anezhi goude kengovliñ tammoù ar gouzoug; hiziv e reer peurliesañ gant tachoù-plakenn unvloc'h, solutoc'h.

clownisme ◇ **clownism** ◇ **1 klavniñ 2 darouesk** g. 1 Iestraouerezh diroll ha chin a stader er barradoù darfell. 2 Laoskegezh hollek ganedigel ar c'henvelloù o kevaraezañ an emwedennañ hag ar gouzisevelladoù.

clubbing ◇ **clubbing** ◇ **kammellegezh** b. Disneuziad an talpennoù askorn e stumm ur gammell horellañ.

co-infection ◇ **coinfection** ◇ **kenboread** g. Poread diaser diwar div hadenn gevarall.

coacervat ◇ **coacervate** ◇ **koakervat** g. Elfenn geurvolekulel er stad liñvel, arluggenn golloidel devec'hiet, gludek kenan (sl. *colloidal* : *solution* ~e).

coacervation ◇ **coacervation** ◇ **koakervatañ** Genel ur c'hoakervat dre zisc'hoalat un arluggenn golloidel dourlen, eleze he digevrediñ etre ar c'hoakervat hag un arluggenn golloidel tanav kenan.

coagglutination, agglutination de groupe ◇ **coagglutination** ◇ **gouzazgludañ, dazgludañ stroll** Perzh gant gwadvez klavñourion 'zo da zazgludañ, ouzhpenn garvevion o c'hleñved, garvevion all a rummad amezek; da skouer, e tro an terzhiennoù paratifoidel, e vez dazgludet ar rummadoù all bazhili paratifoidel ha betek bazhell Eberth, a feurioù izeloc'h evelkent.

coagulabilité ◇ **coagulability** ◇ **kaouledusted** b. Perzh ar gwad da gaoulediñ.

coagulant ◇ **coagulant** ◇ **kaouleder** g. -ioù Danvezenn en arez da zevoudañ ar c'haoulediñ.

coagulase ◇ **coagulase** ◇ **koagulaz** g. Enzim borc'het gant bakteri 'zo, peurgetket gant an darn vuiañ eus ar stafilocok kleñvedus (*stafilocokoagulaz*), o kaoulediñ ar gwad e direaz ur barenn vliavaat reol eus ar gwad hag o tevoudañ tromboziou en annonoù linañ ha furmidigezh ur gwiskad gwarezus fibrin en dro d'an hadennoù.

coagulation ◇ **coagulation** ◇ **kaoulediñ** Steudad an argerzhioù enzimatek o treuzfurmiñ ul liñvenn vevel en ur sonnenn pe un damsonnenn gaotek; kaoulediñ ar gwadvez, anadenn blasmatek, o klokaat ar gwadkaeñ kentael, zo eil lankad ar wikefre herzel ouzh ar gwadliñv.

coagulation intravasculaire disséminée : **syndrome de** ~ (CIVD), **syndrome de défibrination, coagulopathie de consommation** ◇ **disseminated intravascular coagulation syndrome** ◇ **azoniad ar c'haoulediñ engwazhiedel strewek,**

kauledanaez bevezñ Azoniad gwadliñvel naous dre steuz ar fibrinogen eus ar gwad amredat e dianlen an dinod trumm eus parennoù o vli vaat an trombin hag o tec'han daspugnadoù fibrin e-barzh ar gwazhied bihan hag ar steviadur anezho dre tromboziou padennek; dre ma vezev hevelep kaouledadurioù ar fibrinogen, ar parennoù V hag VIII hag ar pladanou, ez a ankaouledus ar gwad hag e tarvez gwadliñvoù; dre zastaol e tinod ur wadheparinegezh endeuat hag ur fibrinloezañ; azoniad a stader da c'houde ur gwilioud, ur gwezh surjaniel war ar bruska (war ar galon gant skoeverdad) pe war ar raksavenn, ur wadlestegezh, ur bleuz, ur c'hankr hollekaet, ur c'hirro, ur pistriadur, h.a.; mezeget e vez dre an heparin hag, en ur stad olañ eus ar c'hleñved, dre skoilherioù ar fibrinloezañ.

coagulation plasmatique ◇ **plasmatic coagulation** ◇ **kaoulediñ plasmatek** Kaoulediñ daleet a stader gant an amwadoù grevus hag an hemofiliezh : amzer o devez an hemati da c'houzediñ, ken e c'hoarvez ar gaouledenn eus ul lodenn grec'h arwenn, treuzluc'h, pladanou ha leukokit anezhi, hag ul lodenn draoñ, ruz, demer, an hemati ouzh he ober.

coagulation : facteurs de la ~ ◇ **coagulation factors** ◇ **parennoù I. (b.) ar c'haoulediñ** Teskad an danvezennou (proteinoù enzimete an darn vuiañ anezho) perzhiat e danzeidigezh ar gaouledenn fibrin, arouezet dre ur sifrenn roman en destladur etrevroadel : parenn I, ar *fibrinogen*; parenn II, ar *protrombin*; parenn IIa, an *trombin*; parenn III, an *tromboplastin gwiadell*; parenn IV, ar *c'halkiom*; parenn V, ar *proakelerin*; parenn V leiden, *protein C*; parenn VI, an *akelerin*; parenn VII, ar *prokonvertin*; parenn VIIeil, *paren Stuart*; parenn VIII, an *tromboplastinogen* pe *paren enephefiolek*; parenn IX, *paren enephefiolek B*; parenn X, *paren Stuart*; parenn Xa, *paren X blivaet*; parenn XI, *PTA* (Sz. *plasma thromboplastin antecedent*), *diaraoger an tromboplastin plasmatek*; parenn XII, *paren Hageman*; parenn XIII, *FSF* (Sz. *fibrin stabilizing factor*) *paren stabilaer ar fibrin*.

coagulopathie ◇ **coagulopathy** ◇ **kauledanaez g.** Anvad rumm evit ar c'hlañvadurioù diwar strafuilhoù ar c'haoulediñ.

coalescence ◇ **coalescence** ◇ **1 kevandiñvañ 2 kendiñvañ, kendiñv g., glenell b.** 1 A-zivout an eginennoù e-barzh ar rizehell (novou), soutañ evit amparañ an organoù ha parzhioù ar c'horf. 2 Kempegad etre div c'horreenn genstok (diwar gleizenn, tanijenn, h.a.).

coaptation ◇ **coaptation** ◇ **kengovliñ** Degas un askorn disvellet pe tammou un askorn torret en o lec'h reizh en-dro.

coacteur ◇ **coactor** ◇ **kengovler g. -ioù** Seurtad plakenn viñset a rener drezi ur c'henwask ahelel evit ober d'un askorn torret kevandiñvañ.

coarctation ◇ **coarctation** ◇ **goudag g.** Strishaenn war ur ganol; arveret e vez an termen dreist holl er c'herienn *goudag an aortenn* (Gl. *coarctation aortique*) pe *isvoll eus strizh an aortenn* (Gl. *sténose isthmique de l'aorte*), kammneuziad c'hanedigal o tec'han un uswask talmerel en izili krec'h hag un iswask en izili traoñ; marvus araok an oad a 30 vloaz diwar orc'had empenn, freg an aortenn pe skorted kofigal kleiz; kuradus dre zazbidañ ar rann isvolle (oberatadenn Crawford).

coarctotomie ◇ **coarctotomy** ◇ **goudagenbenañ** Skejañ surjaniel ur goudag.

cobalamine ◇ **cobalamine** ◇ **kobalamin g.** Anvad rumm ar seurtadoù vitamin B₁₂ (anezho ur c'horvell tetrapirrolek hag un atom kobalt) : *kianokobalamin*, ennañ un ere CN, *hidroksokobalamin*, ennañ un ere OH.

cobalt ◇ **cobalt** ◇ **kobalt g.** Elfenn gimiek (arouez Co) a niverenn atom 27, metal nes dre e berzhioù d'un houarn ha d'un nikel, danvezet da genaozañ seurtadoù dir ha gwarelloù; renket e-touez an nemeurelfennoù, bezant e molekul ar vitamin B₁₂; an izotop a dolz 60 (⁶⁰Co), skinelfenn 5,27 bloaz hanterhoali, ec'hoder β⁻ ha γ, a arverer er Yac'hadouriezh.

cobalthérapie, cobaltothérapie ◇ **cobaltherapy** ◇ **kobaltkurañ** Mezegañ ar c'hankr gant skinadoù ar c'hobalt 60 (sl. *bombe*).

cocaïne ◇ **cocaine** ◇ **kokain g.** Alkaloid douhennet eus delioù ur plant suamerikat, *Erythroxylon coca*, dieraezer lec'hiek ha simpatomimetek ameeun, arveret gwechall er Vezekniezh; anavezet hiziv dreist holl evel bader euvret dre ar genoù, dre sankadennoù pe dre ruflañ (sl. *alcaloides*).

cocainisme ◇ **cocainism** ◇ **kokainegezh b.** Pistriadur gant ar c'hokain.

cocainomane ◇ **cocainomaniac** ◇ **kokaingaezhiad g. -ed** Gouziviad ar c'hokaingaezh.

cocainomanie ◇ **cocainomania** ◇ **kokaingaezh g.** Bevezerezh boas ar c'hokain o tec'han an estoue outañ (ezhomm mac'h-ennek da genderc'hel, stad ezeved diwar an diouer) (sl. *accoutumance, addiction, assuétude, besoin, dépendance, toxicomanie*).

cocarboxylase ◇ **cocarboxylase** ◇ **kokarboksilaz g.** Ester pirofosforek an aneurin (vitamin B₁), gantañ ur roll a bouez e kennevid ar glukid evel araezer dekarboksiladur an drenkenn biruvek.

cocci, Micrococci, coques, microcoques ◇ **cocci, Micrococci** ◇ **Micrococci s., mikrokok s., kok s.** Bakteri a stumm aront, pelennek (stafilokok), viheñvel (strepokok), favennek (meningokok, gonokok), distroll pe bodet dre zaou (diplokok), dre vlokadoù (stafilokok) pe dre chapeleoù (strepokok).

coccidies ◇ **coccidium** ◇ **kokidi s.** Arvevaded unkellig eus kevrennad ar sporozeod, stadet dreist holl e-barzh avu ar c'honikled ma tevoud anafou gwech kistek, gwech hanvevanek; ur genad anezho, *Isoospora*, arvevat ouzh an den ha kiriek da *gokidiaz an avu* (Gl. *coccidiose du foie*), kleñved dibaot azonus dre un anaf heñvel ouzh ar c'hist hidatek.

coccidioidomycose, maladie de Posada-Wernicke, fièvre du désert ◇ **coccidioidomycosis, bumps, coccidiosis, desert rheumatism, California disease, Posada-Wernicke's disease** ◇ **kokidioidomikoz g., kokidiaz g., remm g. an dezerzh, terzhienn b. an dezerzh, kleñved Posada-Wernicke** Kleñved stadet e traoñienn San Joaquin (Kalifornia), naous peurliesañ dre ur resmiad terzhienn berbad, heuliet a-wechoù gant ur prantad eilvedel heñvel a-walc'h ouzh an dorzhellegezh (anafou er

skevent, er pilhon, en eskern hag en arzoù), dedroad grevus a zarvez dezhañ bezañ marvus; ur foue eo ar gwezher, *Coccidioides immitis*, o tont tre er bevedeg dre an analañ.

coccydynie, coccygodynne ◇ **coccydynia** ◇ **belostwa** g. Laur en askorn belost, dezhañ lies arbenn gallus : pe anaf daraezel ar belost, pe nervost skourrou adreñv nervennoù ar groazell; stadet e vez alies e ser ar c'hrozho gant drekc'hwelad ha da geñver anaезioù an adkrozh.

coccypublic : **diamètre** ~ ◇ **coccygeopubic diameter** ◇ **treuzkiz** g. **belostkaezour** Regad etre an askorn belost ha juntad ar c'haezour, muiaet da geñver ar gwilioud dre zisvount an askorn belost.

coccyx ◇ **coccyx** ◇ **askorn belost** Askorn bihan tric'hornek, aspadenn atel al lost, etre peder ha c'hwec'h mellenn kensoutet ouzh e ober, loet e penn izelañ al livenn dindan an askorn kroazell.

cochléaire ◇ **cochlear** ◇ **melc'houedennel**, ~ **melc'houedenn** A-zave d'ar velc'houedenn ha, dre astenn ster, d'ar c'hleved, sk. : *imbourc'h melc'houedennel*.

cochlée ◇ **cochle** ◇ **melc'houedenn** b. Elfenn eus ar skouarn diabarzh, organ ar c'hleved, ouzh he ober ar velc'houedenn ent strizh (pe kanol askornek ar velc'houedenn) ha san ar velc'houedenn (pe kanol lienennek ar velc'houedenn).

cochléopalpebral : **réflexe** ~ ◇ **cochleopalpebral reflex** ◇ **damoug** g. **melc'houedenn-malvenn** Damoug o c'hoarvezout eus gouzizad trumm ar valvenn grec'h ouzh ur sten kreñv dic'hortoz.

cochléovestibulaire ◇ **cochleovestibular** ◇ **melc'houedenn-rakkambr** A-zivout ar velc'houedenn hag ar rakkambr war un dro, pe nervernoù ar velc'houedenn hag ar rakkambr, pe ar c'hleved hag ar c'hempouezañ.

codage ◇ **coding** ◇ **bonegañ** Rezhienañ ur stlennad war ur skor.

Code de la Santé publique ◇ ◇ **Dezveg** b. **foran ar Yec'hed** Teskad an testennoù kefridiel amkanet da wareziñ ha da herouezañ yec'hed an hiniennoù hag ar strolleñnoù.

code génétique ◇ **genetic code** ◇ **hilvoneg** b. Teskad ar stlennadoù hêrezhel enskrivet er c'hromozomou ret da enaozañ, diouzh ur steuñv munudaouet raksavelet piaouel da bep hinienn, ar proteinou bezant e-barzh kelligoù he bevedeg : ar goulev o c'hoarvezout eus an daouadou bazennoù nitrogenek oc'h amparañ arvelloù an DNA, treuzskrivet war an RNA kannad (*mRNA*), a vez erounezet gant harp ar ribozomou dre ziuz ha trevnañ an amindrenkennoù a ya d'ober proteinou ar protoplasm; lavarout a reer e vez ar c'henenn-mañ genenn o vonegañ enaozerezh ar protein-mañ protein (sl. *base, cistron, codon, gène, hérédité, opéron, ribosome*).

codéine, méthylmorphine ◇ **codeine, methylmorphine** ◇ **kodein** g., **metilmorfin** g. Alkaloid douhennet eus ar roz moc'h, dic'hoster leiek, diounezet dre euvriñ evel eneppezeg.

codéinomanie ◇ **codeinomania** ◇ **kodeingaezh** g. Bevezerezh boaziek ar c'hodein hag estoue outañ.

Codex, codex medicamentarius, pharmacopée ◇ **pharmacopoeia, codex** ◇ **Boneg** b. **al liaoù, Liavoneg** b. Roll an diferennoù kefridiel o tougen war ar gwezherioù en araez da vont er mestragevezhioù hag er brientaozadoù; e destladur kefridiel Frañs ez eo bet erlec'hiet *Pharmacopée* ouzh *Codex*; en tu all d'al liavonegoù rizez ez eus ul Liavoneg etrevroadel hag, abaoe 1970, ul Liavoneg europat.

codominance ◇ **codominance** ◇ **kedtrech'hegezh** b. Perzh gant div c'henenn allel da erzerch'haat o div er fenotip an doare-ennou en o dalc'h; en ur gouzrec'h allreek o tougen div c'henenn allel kedtrech'hek e vo ar genotip klok erzerch'haat er fenotip evit a sell ar stlenn endalc'h gant ar genennoù-se.

codominant ◇ **codominant** ◇ **kedtrech'hek** aa. O toareañ pep hini eus an div c'henenn a zo ganto perzh ar gedtrech'hegezh.

codon ◇ **codon** ◇ **kodon** g. -où Unanenn eus an hilvoneg, en he dalc'h an enaozerezh eus un amindrenkenn, o c'hoarvezout eus tri daouad nukleotidoù a 'n DNA, sk. : an triad adenin-adenin-guanin o vonegañ enaozerezh al lizin.

coefficient d'absorption spécifique ◇ **specific absorption coefficient** ◇ **gwezhiader** g. -ioù **lugañ rummel** Rannad ar gwezhiader mougañ dre ar bec'h eus ur c'horf war zileizh (sl. *coefficient d'extinction*).

coefficient d'activité ◇ **activity coefficient** ◇ **gwezhiader gweredegezh, gweredekter** g. **bec'hel** Rannad gweredegezh ur c'horf war zileizh dre ar bec'h anezhañ.

coefficient d'atténuation, coefficient (linéaire) d'affaiblissement ◇ **attenuation coefficient** ◇ **gwezhiader distav** Tebegezh, dewerzhed dre unanenn regad a zanvez treuzet, a vez d'ur fotonenn bezañ luget pe amstrewet ha, dre se, na vezañ en hordenn eztreuat (sl. *coefficient massique d'atténuation*).

coefficient d'efficacité lumineuse ◇ **luminous efficiency coefficient** ◇ **gwezhiader efeedusted luc'hel, gwezhiader luc'hefeedusted, gwelsked** g. Rannad gremmsked ul luc'h dave (gwenn peurliesañ) dre c'hremmsked ul luc'h unliv o tec'h an an un santadenn; emañ ar gwezhiader luc'hefeedusted e dalc'h an trohed hag azasadur al luc'hsae (sl. *brillance visuelle : sensation de* ~).

coefficient d'efficacité protéique ◇ **protein efficiency ratio** ◇ **gwezhiader** g. **efedusted proteek** Gwezhiader o tewerzhañ askorad ur protein euvret, jedet dre rannañ kresk ar pouez korf dre gementad ar protein bevezet, imbourc'h renet war ar razi 21 deiz maget gant ur boued skouerieketaet a zo ennañ 10 % proteinou.

coefficient d'extinction ◇ **coefficient of extinction** ◇ **gwezhiader mougañ** Lugez dre unanenn regad eus un dileizhenn suj da saveleñn Berr-Lambert.

coefficient d'extinction molaire ◇ **coefficient of molar extinction** ◇ **gwezhiader mougañ molel** Rannad ar gwezhiader mougañ dre ar bec'h mol/mL eus an dileizhed.

1 coefficient d'extraction 2 coefficient d'extraction, coefficient de partage ◇ **1 extraction ratio 2 distribution ratio** ◇ **1 gwezhiader douhenniñ 2 gwezhiader dasparzhañ** 1 Termen a Liagorzhoniezh, rann lia douhennet gant un organ da bep tremen eus ar gwad hag, e se, lamet eus an amred dre gennevadañ pe dre ezvevennañ. 2 Keñver etre bec'hioù ketep ur c'horf war zileizh dasparzhet etre daou zileizher anvesk.

coefficient d'utilisation digestive des protéines ◇ **net protein utilisation** ◇ **gwezhiader danveziñ koazhadel ar proteinoù** Rannad an nitrogen azdalc'het gant ar bevedeg dre an nitrogen euvret.

coefficient de friction ◇ **friction coefficient** ◇ **gwezhiader rimiañ** Keñver etre an nerzh rimiañ arbenniat ouzh loc'h ur rannig en ur metoù liñvel hag an tizh anezhi.

coefficient de perméabilité ◇ **permeability coefficient** ◇ **gwezhiader hedreuzded** Niver molekul eus ur c'horf lavaret o treuziñ ur gennenn dre unanenn bad hag unanenn c'horread pa vez par d'an unanenn ar c'hemm bec'h etre daou dal ar gennenn; e dalc'h skignusted ar molekul ha nauuusteroù ar gennenn.

coefficient de prolifération ◇ **proliferation coefficient** ◇ **gwezhiader neriiñ** Dregantad eus kelligoù ur wiadenn engwezhiet en un nergor.

coefficient de réflexion diffuse ◇ **diffuse reflexion coefficient** ◇ **gwezhiader disvannañ amstrewat** Keñver etre gremmgaster gorreel (Gl. *radiance énergétique*, MT^{-3}) un ergoren hag he gremmc'houlouder (Gl. *éclairage énergétique*, MT^{-3}).

coefficient massique d'atténuation ◇ **mass attenuation coefficient** ◇ **gwezhiader tolzel distav** Rannad ar gwezhiader distav dre dolzder ec'honel ar metoù ma c'hoarvez an distav (sl. *coefficient d'atténuation*).

coefficient masticoaire ◇ **masticatory percentage** ◇ **gwezhiader chaokat** Dregantad oc'h andalañ perzhded un dentadur jedet dre sammañ ar gwerzhadoù debarzhet da dalvoud arc'hwelel pep koublad dent kengeñverek.

coefficient osmotique, coefficient de Van't Hoff ◇ **osmose coefficient** ◇ **gwezhiader treleizhiñ, gwezhiader grenn** Gwezhiader a ebarzher e jederezh derc'hek ar grenn evit derc'hel kont eus gwerc'hegezh dileizhennoù 'zo.

coefficient thérapeutique ◇ **chemotherapeutic index** ◇ **gwezhiader kimiguradel** Keñver etre doen kurañ ha doen pistriañ ul lia.

coelialgie ◇ **coelialgia** ◇ **torost b.** Anvad rumm al laurioù kof don simpatek, ha pa ve nervennoel, nervostel pe neurozel an orin anezho.

coeliaque ◇ **c(o)eliac** ◇ **1 torel aa. 2 keliakel aa.** 1 A-zave da gavenn an tor. 2 A-zave da blezhad ar poullkreuz pe plezhad keliakel (TA *plexus coeliacus*, Gl. *plexus coeliaque, plexus solaire*).

coeliaque : maladie ~, maladie de Gee ◇ **c(o)eliac disease, gluten enteropathy, Gee's disease** ◇ **kleñved torel, kleñved Gee** Anaez ar vagadell pe ar maban, nauuus, *ent klinikel* dre un darc'hoal deraouet trumm, druzoul, gloen vuiek, stad hollek fall gant treutadur, amwad, kaheristant, tetaniezh, dilerc'hegezh kreskiñ, askornvloedad, *ent neuziadurel*, dre un isteñv eus ar bodennoù pervez; a-frapadoù e vez an dedro; didorroù a stader pa ezkaeler ar gluten eus magadur ar glañvourion; ar pare a c'hell c'hoarvezout d'an oad a 7 pe 8 vloaz; dianav eo arbenn ar c'hlañvadur evit c'hoazh, goulakaet e vez roll un orin hangaeel pe ur c'hentuadur hilel.

coeliaque : réflexe ~, réflexe solaire ◇ **c(o)eliac plexus reflex** ◇ **damoug plezhad ar poullkreuz, damoug keliakel** Gwanidigezh ha gorrekadur, steuziadur zoken, ar poulz a-werzhid pa vez pouezet start war an argreuzenn.

coeliocirurgie ◇ **c(o)eliosurgery** ◇ **Torsurjianerezh g.** Surjianerezh renet dindan dorengweliñ (ezvenañ an divilhenn, ar gellenn vestl).

coelioscopie ◇ **c(o)elioscopy** ◇ **torengweliñ, torwerañ** Imbourc'hiñ gweleled kavenn ar c'hof bet dardennet dre doraezhañ, eleze dre enc'hwezhañ un aezhenn (CO₂) etre div feilhenn an ampeleñ; sankañ a reer ul luc'honi (endoskop, mammenn c'houlou, kamera kenereet ouzh ur skramm) a-dreuz speur ar c'hof (*torengweliñ treuzspeurel, speurengweliñ*, Gl. *coelioscopie transpariétale, laparoscopie*) pe adreuz ar c'hleuz youlc'h-krozh (*torengweliñ treuzgouinel, oufengweliñ*, Gl. *coelioscopie transvaginale*) (sl. *culdoscopie*).

celome ◇ **c(o)elom** ◇ **kelom g.** Er rizhell, kavenn dalc'het etre div feilhenn ar mezoderm.

coelonychie, coilonychie, koilonychie ◇ **koilonychia** ◇ **ivinargev g.** Disneuziadur an ivinoù, war wint o lodenn dro hag argevek o lodenn greiz.

coenzyme ◇ **coenzyme** ◇ **koenzim g.** Stroll prostetek an enzimoù heteroproteinek, eleze an darn anspesadel anezho; perzh a gemer en dazgwered trelusket gant an enzim en ur chom digemm; an darn all, spesadel, eus an enzim zo an *apoenzim*; spesadoù koenzim eo ar *c'hokarboksilaz*, ar *c'hodezhidraz* (pe *kodezhidrogenaz*), ar *c'hozimaz*, ar *c'hoenzimoù A, I, II* (sl. *apoenzyme*).

cœur ◇ **heart** ◇ **kalon b.** Organ kahekek kleuz o wezhiañ amred ar gwad dre e argrezadoù korvezek; loet e kavenn arak ar poullkreiz, anezhañ teir sae : diabarzh, an *enkalonenn*; etre, ar *c'hafer kalon*; diavaez, an *amgalonenn*; ouzh e ober daou *gentez* ha daou *gofig*, dehou ha kleiz, etrezo ur speur, an *dilhenn*; dre ur *gwask* sac'hellek emañ kehent pep kofig gant ar c'hentez a-gendu ha gant an dalmerenn ma kas ar gwad.

cœur artificiel, prothèse cardiaque ◇ **artificial heart** ◇ **osod g. kalon, kalonosod g.** Ardivink ensteudadus amkanet da amsaviñ ar galon fellat, pe ent padennek (war c'hortoz eus un treuzplantadur), pe da vat.

cœur d'athlète ◇ **athletic heart** ◇ **kalon sportour** Daskemmadoù stadet a-wechoù war galon an dud yac'h oc'h embreger ur gourdonerezh sportel rennek ha hirbad, kalonistead godel, kofigusteñv, tolc'had kentez-kofig a 1^h derez.

cœur basedowien ◇ ◇ **kalon vazdovel** Teskad ar rouestladoù kalon da gleñved Basedow : trec'hwezh, rastrid, dreistsistolou, barradoù ustead, ankorvez a c'hell disoc'h er skorted kalon ; azoniad stadet en adenomou pistriek hag er pennsac'hou liesnozelek pistriek (sl. *adénome thyroïdien toxique, cardiomyose*).

cœur de bœuf ◇ **cor bovinum** ◇ **kalon ejen** Kalon usteñvek en he fezh.

cœur forcé ◇ **strained heart** ◇ **kalon drastennet** Falladur kalon o tarvezout da heul ur strivad taer pe ur skuizhad hirbad.

cœur irritable, syndrome de Da Costa ◇ **cardiac neurosis** ◇ **kalon hegeuziek, azoniad Da Costa** Kalonustead godel genezhel, peurzalc'hus pe devoudet gant ar strivadoù, ar fromoù, al loadur war sav, kevret gant rastridoù, enkrez ha strafuilhoù gwazhiedloc'hadel ; a-geñver gant distabiled ha hegeuzded ar reizhiad nervstruzhel ha, dre vras, an ustant simpatek.

cœur myxœdémateux ◇ **myxoedema heart** ◇ **kalon ar miksedem, kalon viksedematus** Teskad an erzerc'hadoù kalon diwar ar skoedisvorc'h : kalonistead, kalonusvent diwar un ensiladur miksedematus er c'haer kalon hag ur fennad en amgalonenn, kalonisvarwezad ; azonou a zireer dre ziounit douhennadoù skoedenn.

cœur pulmonaire ◇ **pulmonary heart, cor pulmonale** ◇ **kalon skeventien** Skorted ar galon dehou da heul uswask en amred talmerel ar skevent diwar ur skeventanaez ; anv a reer a *galon skeventien lemm* (Gl. *cœur pulmonaire aigu, CPA*) pa vez dec'hanet trumm an uswask gant un enfrou skevent bloc'hek pe vruskaezhadoù 'zo, a *galon skeventien henek* (Gl. *cœur pulmonaire chronique, CPC*) pa zarvez an uswask a-nebeudoù e dianlen un anaev analadel henek (emfizem, skleroz ar skevent, asma, distummadurioù bras eskern ar brusk, enfraouioù skevent).

cœur en sabot ◇ **cœur en sabot** ◇ **kalon botez koad** Skinlun ar galon o lakaat war wel usteñv ar c'hofig dehou naouus dre ar muiadur a-zremm ha war zehoù eus skeudenn ar galon ha gwintadur kern ar galon.

cofacteur ◇ **cofactor** ◇ **kedparenn b.** Danvezenn a zeu he gwered da vuiaat gwered ur wezhuzenn all, sk. : ar parennoù kotromboplastek.

cognition ◇ **cognition** ◇ **1 naout, anaout 2 naoudezh b. 3 naoudad g.** 1 Kaout erouez d'ar spered. 2 Arc'hwel an naout, hollad an argerzhioù gougorzhnet gant an naout (ar merzhout, an devezout, h.a.). 3 Gwezh naout (sl. *agnosie, comportementalisme, conation, gnosie*).

cohérent ◇ **cohesive** ◇ **kengantus aa.** A-zivout un dispuilhad a zeu an elfennoù anezhañ da gejañ kenetrezo a eil lank, sk. : ar *vrec'h kengantus*, aet kendalc'hek elfennoù an dispuilhad anezhi d'an ampoent ma stagont da linañ ; pa vez kenstag an elfennoù diwar derou an dispuilhañ, e komzer a zispuilhad *daskantus* (Gl. *confluent*).

cohorte ◇ **cohort** ◇ **droue b.** Keal stadegel arveret er Reuziadoniezh, stroll gouzrec'hioù a zo boutin etrezo un naouster dewerzhadus ent treadegel, sk. : droue gouziviaded an asma en ur boblañs lavaret.

coiffe des rotateurs ◇ **rotator cuff** ◇ **kouc'h g. ar c'higennoù c'hweler, koc'h c'hwelerel** Teskad ar gwiennoù stirennek o tout eus peder c'higenn c'hweler ar skoaz (kigennoù is- hag us-sperenn, us-skoaz ha ront bihan) enlenet ouzh pourc'had ar c'henvell.

coiffer

- *partie antérieure du spermatozoïde, coiffant son noyau* rann arak ar spergellig o kabellañ ar graoñell anezhi.

coïncider

- *faisceau lumineux coïncidant avec le faisceau de rayons X* hordenn luc'h en arun gant treug ar skinoù X.

coït ◇ **coitus** ◇ **embaradenn b., keventrac'h b.** Kediadenn revel.

col vésical : maladie du ~, maladie de Marion ◇ **vesical prostatism** ◇ **kleñved gouzoug ar c'hwezhigell, kleñved Marion** Anaev o tizhout dreist holl ar vagadell pe ar maban, dibaotoc'h an oadourion, naouus dre un tenndroazh, un azzalc'h, an dezioulata ha betek an andalc'h dre c'hourberañ ; devoudet, er vugale, gant miarc'hwel kelc'hstrishaer ar c'hwezhigell pe gant kammneuziad lodenn adreñv ar c'han troazh ; en oadourion, gant strafuilhoù ar raksavenn (raksavennfo pe adenom).

col(-)

- *faux sac en communication avec l'artère par un collet* gaousac'h kehent gant an dalmerenn dre ur mulgul
- *le col de la vésicule séminale* gouzoug ar gellenn sper
- *le col du fémur* gouzoug an askorn morzhed
- *le collet de la dent* gouzoug an dant
- *le collet de la vésicule biliaire* mulgul ar gellenn vestl.

colchicine ◇ **colchicine** ◇ **kolkikin g.** Alkaloid douhennet eus *Colchicum autumnale*, arveret abaoe kantvedoù da brederiañ ar barroù urlou, diounezet ivez hiziv ouzh an derzhienn vareadek hag ouzh anaezioù 'zo eus ar gwriad kenglenel ; tremen a ranker gant doenoù bihan en askont d'e bistriegezh koazhadel.

colectasie ◇ **colectasy** ◇ **kolonusvoll g.** Bolc'hadur ar c'holon.

colectomie ◇ **colectomy** ◇ **kolonezvenañ** Dazbidañ holl pe darnel pe c'holon.

colibacille, *Escherichia coli* ◇ **colibacillus**, *Escherichia coli* ◇ **kolibazhell** b. -illi, *Escherichia coli* Seurtad bakteri eus kerentiad an Enterobakteriakeged, oc'h arvevañ ent reol ebarzh pavez an den hag al loened ma vez ankleñvedus, o vont anialek bras en amveziadoù 'zo hag o tec'h an neuze anaezioù evel darc'hoal ar vugale, ar c'holera nostras, poreadoù troazhadel, h.a.

colibacillose ◇ **colibacillosis** ◇ **kolibakilloz** g. Poreadur gant ar c'holibazhilli.

colibacillurie ◇ **colibacilluria** ◇ **troazhkolibazhellegezh** b. **troazhkoliegezh** b. Bezañs kolibazhilli en troazh.

colique ◇ **colic** ◇ **gwentl** g. Laur kriz pe grisoc'h o sezañ en ur flugezenn.

colique appendiculaire ◇ **appendicular colic** ◇ **divilhennost** b. Laur o sezañ en divilhenn breñvek.

colique de plomb, **colique saturnine** ◇ **saturnine colic** ◇ **gwentl plomel** Azoniad patañ ar pistriadur plomel, anezhañ ul laur kof grizias o saezhenniñ trema al loan, an divvorzhed hag ar gousac'h, kevret gant ur goustivadur ferv ha c'hweladoù, didennadur speur ar c'hof, dikrotegezh ar poulz.

colique hépatique ◇ **hepatic colic**, **biliary colic** ◇ **gwentl an avu**, **gwentl bestlel** Laur er c'hougstadenn dehou, o saezhenniñ trema ar skoaz, kevret gant goustivadur, c'hweladoù hag ikter a-wechoù, devoudet gant stennadur ar forzhioù bestl en dro d'ur c'hrouanenn war dreank ouzh o steviañ.

colique néphrétique ◇ **nephritic colic** ◇ **gwentl al lounezh** Laur brevus e rannbarzh al loan, o saezhenniñ trema ar c'hwezhi-gell hag ar vorzhed, kevret gant goustivadur, c'hweladoù, tangrez ar c'hwezhi-gell, devoudet gant ur c'hrouanenn o treankañ dre ar san droazh eus al lounezh d'ar c'hwezhi-gell.

colique salivaire ◇ **salivary colic** ◇ **gwentl halvel** Barrad laur o sezañ en ur wagrenn halviñ, kevret gant borc'hadur puilh an halv, diwar vezañs ur c'hrouanenn e-barzh ar san degorzhañ.

colique spermatique ◇ ◇ **gwentl an derodiñ** Glaz o tarvezout e dibenn ar gediadenn revel diwar danijenn er c'hellennoù sper.

1 2 colique testiculaire **2 colique épидidymaire** ◇ **testicular colic** ◇ **1 gwentl ar glidenn** **2 gwentl an argell** 1 Barrad laur lemm o tizhout ar grennarded diwar an tagelladur e-barzh kanol ar varlenn eus ar glidenn kresket he ec'honad gant ar gaezouegezh. 2 Laur diwar an azdalc'h sper o tarvezout gant un emziouerer.

colique utérine ◇ **uterine colic** ◇ **gwentl ar grozh** Barrad laur lemm al lestr bihan, kevret gant argrezadoù ezvountañ, diwar ar vezañs eus polipoù e-barzh ar grozh.

colite ◇ **colitis** ◇ **kolonfo** g. Tanijern ar c'holon.

collaber ◇ **to collapse** ◇ **goustouiñ** Devoudañ gouzivadur un organ kleuz, sk. : goustouiñ ur skeventenn, eleze ober dezhi flakañ dre he fellaat diouzh speur ar bruska (sl. *collapsothérapie*).

collagénase ◇ **collagenase** ◇ **kollagenaz** g. Enzim en araez da loezañ ar c'hollagen.

collagène ◇ **collagen** ◇ **kollagen** Unan eus skleroproteinou ar gwriad kenglenel, e rezh gwiennou ent vev, o treiñ e gelatin dre livrizhañ.

collagène : maladie du ~, **collagénose**, **connectivite** ◇ **collagen disease** ◇ **kleñved ar c'hollagen**, **kollagenoz** g., **konnektiv** g., **kenglennaoued** g. Anvadoù rumm, sellet evel tidek gant aozerion 'zo, lakaet war ur bodad kleñvedoù a zo boutin etrezo tizhadur ar gwriad kenglenel, ent resis disleberadur ar gwiennou kollagen : al lupuz eritematus lemm strewek, an dermatomiozit, ar skleroderma, an trodalmerennfo ozvennek, remm lemm an arzoù, al liesarzfo rumatoidel, ar purpura olpladanel tromboseiat, an enkalonenno anvakteriek, h.a., kleñvedoù holl a renker hiziv e stern ar c'hleñvedoù unangeuziadet pe e stern kleñvedoù an hangaegemplezhioù.

collagénome ◇ **collagenoma** ◇ **kollagenom** g. Yoc'henn guñv ar c'hroc'hen amparet gant gwiennou kollagen.

collapsothérapie ◇ **collapsotherapy** ◇ **goustougrañ** Hentenn brederiañ an dorzhellegezh bet arveret kent oadvezh ar bevastalerioù dre zevoudañ flakadur ar skeventenn glañv war-benn he lakaat er paouez hag e tro da gleizennañ aesoc'h ; e wezhiañ a raed dre veur a galvezder : *bruskaezhañ* dre enc'hwezhañ aer etre feilhennou ar grezenn, *bruskateleviñ*, *kernezhglenañ* (sl. *apicolypse*, *pneumothorax*, *thoracoplastie*).

collapsus ◇ **collapse** ◇ **1 koempad** g. **2 goustouad** g. 1 Leiadur herrek ha padek ar gwask talmerel betek 8 cmHg, elfenn eus azoniad ar bleuz (sl. *choc*, *état de choc*). 2 Flakadur kleñvedel pe yac'hadel un organ kleuz (sl. *collaber*, *collapsothérapie*).

collapsus-flush ◇ **collapsus-flush** ◇ **koempad-gwrld** g. Kevreted ur bleuz gant dulaz ha bouilhadoù gwazhiedfrankaat o tarvezout a-wechoù e-kerz dedroadur karkinoïdoù ar vouzellenn voan.

collapsus pulmonaire ◇ **pulmonary collapse** ◇ **goustouad skevent** Flakadur kleñvedel ur skeventenn pa vez diskaset gant ur fennad krezenn, ur bruskaezhad pe ur yoc'henn.

1 collapsus ventriculaire ◇ **1 ventricular collapse (brain)** **2 ventricular collapse (heart)** ◇ **1 goustouad kambroù (empenn)** **2 goustouad kofig** 1 Flakadur kambroù an empenn diwar iswask al liñvenn benn-kein. 2 Flakadur ur c'hofig diwar amwask ar galon dre ur fennad amgalonenn (kouchadur) (sl. *tamponnade*).

collatéral

• *branche collatérale d'une artère* barr kengostezel un dalmerenn • *circulation collatérale de suppléance* amred kengostezel kevelat • *hémiplegie collatérale (= homolatérale)* ledseizi a-gendu (gant an anaf).

colle biologique ◇ **biological glue** ◇ **peg bevedel** Peg danvezet da brederiañ enrec'hioù an aortenn, fregadoù an teuc'helloù treizher, rogadoù ar c'haer kalon, h.a., da von ennañ ar fibrin, ar gelatin pe ar c'hianoakrilat.

collectionnisme ◇ **collectionnism** ◇ **dastumvar g., dastumvariadezh b.** Tech kleñvedel da verniañ traezoù ha d'o fiaouañ, a stader e meur a furn glinikel : en dilerc'hegezh, en ambrenoù psikozel (meurvredezh, mania), el laervar, er bizhoni, er fetichegezh, er foranerezh, h.a..

collect-

• **collecter les bactéries** daspugn ar bakteri • **collection aérienne** hogennad aezhenn • **collection de liquide clair** hogennad liñvenn sklaer • **collection purulente, collection suppurée** daspugnad lin, hogennad lin • **collections gazeuses ou liquides** hogenn-adoù aezhel pe liñvel • **liquide collecté par la vessie** liñvenn dastumet gant ar c'hwezhiell • **tube collecteur** pibell dastum.

collier ◇ **collar** ◇ **kolier g. -où** Kavnell disloc'h evit derc'hel damzifiñv al livenn c'houzoug.

collier de Casal ◇ **Casal's necklace** ◇ **kerc'hennad g. Casal** Anaf kroc'hen, erzerc'had a 'r pellagr, o sezañ en dro d'ar gouzoug, anezhañ plakadoù ruz gouliñvek a lez war o lerc'h, goude gourc'hennañ, un epiderm moan, lufri ha roz.

collier de Vénus ◇ **Venus's collar** ◇ **kerc'hennad Gwener** Sifilid livegennek o sezañ en dro d'ar gouzoug, gant ar vaouez pergen.

collodion ◇ **collodion** ◇ **kollodion g.** Dileizhenn nitrokeluloz en ur meskad alkool hag eter, a lez war ar c'hroc'hen goude diaezhennañ ur goc'henn wareziñ.

colloid milium, colloïdome miliaire ◇ **colloid milium** ◇ **colloid milium, kolloïdom g. milier** Dic'henezhadur kolloidel an derm, anaez dibaot kaer.

colloïdal : état ~ ◇ **colloid state** ◇ **stad kolloïdel** Trevnad o c'hoarvezout a zaou arvez, an eil kendalc'hek (en arc'hronn), egile strewek (en arc'hoal) e rezh rannigoù a etre 10^{-6} ha 10^{-7} mm treuzkiz; arc'hoalenn hag arc'hronnenn a c'hell revout en teir stad : sonnel, liñvel, aezhel.

colloïdal : solution ~e ◇ **emulsion colloid** ◇ **arlugenn b. golloïdel** Arlugenn (nad eo ket un dileizhenn) ma vez an arc'hoalenn e rezh rannigoù amparet gant keurvolekul (mikell) (sl. *micelles*).

colloïde ◇ **colloid** ◇ **1 kolloïd g. 2 kolloïdel aa.** 1 Danvezenn dezhi neuz ar c'haot. 2 Gant neuz ar c'haot.

colloïde : dégénérescence ~ ◇ **colloid degeneration** ◇ **dic'henezhadur g. kolloïdel** Treuzfurmadr kelligoù yoc'hennoù yud'zo en ur meni kaot.

colloïde : substance ~ ◇ **colloid substance** ◇ **danvezenn golloïdel** Danvezenn gaotek heñvel ouzh ar mugin, kantalc'hekok'h egetañ ha hep goueleidiñ eveltañ dre an drenkenn aketek; anezhi borc'had kelligel, er skoedenn pergen, pe disoc'h diwar dic'henezhadur ar c'helligoù.

collutoire ◇ **collutory, collutorium** ◇ **genolc'h g. -ioù** Lia da vezañ arloet ouzh glaourgenn kavenn ar genoù hag ar munsunoù.

collyre ◇ **collyrium** ◇ **kollir g. -où** Lia da vezañ arloet ouzh ar gevresae.

colobome ◇ **coloboma** ◇ **kolobom g.** Kammneuziad lagad, anezhi ur skarr sezet er malvennoù, er ganevedenn, er ferenn, en dolgennsae pe el luc'hsae; arveret e vez an un termen da envel ar skarrou kammneuziad en dremm, etre ar weuz krec'h hag ar valvenn draoñ.

colocolostomie ◇ **colocolostomy** ◇ **kolonasforzhañ** Dasforzhañ kolon-ouzh-kolon goude dazbidañ ur rann anezhañ pe evit skoeviñ ur yoc'henn anezvenadus.

colocystoplastie ◇ **colocystoplasty** ◇ **c'hwezhiellatelviñ a-golon** Dazluniañ surjaniel ar c'hwezhiell diwar-bouez un tammad eus ar c'holon (sl. *cystosigmoïdoplastie, entérocystoplastie*).

colofibroscopie, coloscope ◇ **fibrocolonoscope** ◇ **kolofibroscop g.** Fibroskop ahevuker da engweliñ ar c'holon.

colofibroscopie, coloscopie ◇ **fibrocolonoscopy, colonoscopy** ◇ **kolonengweliñ** Imbourc'hiñ gweledel ar c'holon diwar-bouez ar c'holofibroscop ebarzhet dre hent ar youlc'h.

cololyse ◇ **cololysis** ◇ **kolonezglenañ** Loezañ glenelloù ar c'holon.

côlon ◇ **colon** ◇ **kolon g.** Bouzellenn dev, lodenn eus ar pervez adalek an trapig klunegenn-sac'henn betek ar youlc'h, pevar farzh ouzh he ober : ar c'holon a-sevel (pe kolon dehou), ar c'holon treuz, ar c'holon a-ziskenn (pe kolon kleiz), ar c'holon sigma.

colonie ◇ **colony** ◇ **kludad g.** Teskad garvevion pe kelligoù evodet eus an un elfenn.

colonies de fibroblastes : test d'inhibition des ~ ◇ ◇ **prouad g. astaliñ ar c'hudadoù fibroblast** Hentenn andalañ ar gempadust kelligel etre roer ha roadour un imboud; ober a reer da limfokit ar roadour keraezañ un diñvadenn fibroblast eus ar roer ha, goude 48 h, dre erinvañ ar fibroblast ez anavezet kelligpistriusted al limfokit en o c'heñver.

colopathie ◇ **colopathy** ◇ **kolonad g., kolonanaez g.** Anvad rumm klañvadurioù ar c'holon.

colopexie ◇ **colopexy** ◇ **kolonAanlenañ** Stagañ surjaniel ur rann re heloc'h eus ar c'holon ouzh spur kavenn ar c'hof.

coloptose ◇ **coloptosis** ◇ **kolonislink g.** Rikladur war draoñ eus ar c'holon treuz.

colorant ◇ **colo(u)ring** ◇ **livuzenn b.** Danvezenn livek naturel pe gevanaoz en araez da intrañ ent padennek pe ent trebadek un danvezenn vevel bev pe festet.

- colorant antiseptique** ◇ **antiseptic dye** ◇ **livuzenn dilester** Livuzenn gevanaoz arloet ouzh ar gwiadoù bev evel dilester.
- colorectorrhaphie** ◇ **colorectorrhaphy** ◇ **asforzhañ kolon-youlc'h** Krafaelañ penn izelañ ar c'holon sigma ha penn uhelañ skarvenn ar youlc'h evit adsavelañ ar forzh goude ezvenañ ur c'hankr sigma-youlc'h.
- colorectostomie** ◇ **colorectostomy** ◇ **dasforzhañ kolon-youlc'h** Skarvañ ur c'hilbleg eus ar c'holon ouzh ar youlc'h.
- colorimétrie** ◇ **colorimetry** ◇ **livventerezh g.** Andalerezh al liv hervez teir arventenn : an *arne g.* pe *trohed* (Gl. *teinte, longueur d'onde*, Sz. *hue, tint*) o tigemmañ ruz, melen pe glas, al *leunvez b.* (Gl. *saturation*, Sz. *saturation, colorfulness, chroma*) o tigemmañ ruz ha roz, al *lugern g.* (Gl. *clarté, luminosité*, Sz. *brightness, lightness* pe *value*) o tigemmañ ruz sklaer ha ruz teñval; al *livventer* (Gl. *colorimètre*) a vuzuilh al luc'h luget pe dreuzkaset gant ur sonnenn pe ul liñvenn livek; dedalvezet e vez al livventerezh evit dezventañ hemoglobin ar gwad.
- color-**
- *chromatopsie colorant faussement en vert les objets perçus* arnewel a ra kammzerc'hañ un arliv gwer war an traoù
 - *colorable par l'éosinate d'azur* heliv gant an eozinat azur
 - *colorant spécifique des mucopolysaccharides acides* livuzenn spesadel ar mukopolisakaridoù trenkek
 - *colorants acides ou basiques* livuzennoù trenkek pe bazek
 - *frottis colorés au May-Grünwald-Giemsa* lifradoù livet gant ar May-Grünwald-Giemsa
 - *protéine colorée* protein livek
 - *substance incolore par elle-même, mais capable sous diverses influences de donner naissance à un produit coloré* danvezenn diliv drezi he unan, en araez da c'heneal un aozad livek diwar zelanvadoù lavaret .
- colorrhaphie** ◇ **colorrhaphy** ◇ **kolondlita** Krafaelañ ar c'holon.
- colosigmoidostomie** ◇ **colosigmoidostomy** ◇ **dasforzhañ kolon-sigma** Skarvañ ar c'holon a-sevel pe ar c'holon treuz hag ar c'hilbleg sigma.
- colostomie** ◇ **colostomy** ◇ **kolonezforzhañ** Savelañ un adfraezh surjaniel dre skarvañ ar c'holon a-ziskenn pe ar c'holon sigma ouzh ar c'hroc'hen.
- colostrum** ◇ **colostrum** ◇ **kellaezh g., laezh g. uzen** Liñvenn velen, alkaliek, albuminek, o kaouediñ ouzh ar wrez, borc'h et gant ar vronn e diwez ar vrazediz hag en deizioù goude ar gwilioud, o lezel he lec'h tamm ha tamm gant al laezh.
- colotomie** ◇ **colotomy** ◇ **kolonenbenañ** Digeriñ surjaniel ar c'holon.
- colpatrésie, atrésie du vagin** ◇ **colpatresia** ◇ **gouinanvoll g., anvoll ar gouin** Andigor ar gouin.
- colpectasie, dilatation du vagin** ◇ **colpectasia, colpectasis** ◇ **gouinusvoll g., usvoll ar gouin** Frankted ezreol ar gouin.
- colpectomie** ◇ **colpectomy** ◇ **gouinezvenañ** Dazbidañ darnel pe hollel ar gouin, embreget peurliesañ da brederiañ an izadoù er vaouez kozh.
- colpeurynter** ◇ **colpeurynter** ◇ **gouinfrankaer g. -ioù** Ardivink amkanet da ledanaat oaled ar gouin.
- colpocœliotomie** ◇ **colpoceliotomy** ◇ **torenbenañ treuzgouinel** Digeriñ surjaniel kavenn an ampeleñ a-dreuz da speur ar gouin.
- colpocèle** ◇ **colpocele** ◇ **gouinogad g., kummogad g.** Avelenn dre speur ar gouin (*komm*), anezhi : 1) ogad ar youlc'h dre ar speur adreñv (*drekommogad, kummogad ar youlc'h, youlc'hogad*, Gl. *colpocèle postérieure, rectocèle*); 2) ogad ar c'hwezhegell dre ar speur araoek (*rakkommogad, kummogad ar c'hwezhegell, c'hwezhegellogad*, Gl. *colpocèle antérieure, cystocèle*); hiziv e lakaer kemm etre *kummogad* pa na vez sac'h ampeleñ ebet en avelenn, hag *oufogad* (Gl. *élytrocèle*) pa vez unan, ar pervez, diskennet en *ouf* (*kleuz youlc'h-kroz*, Gl. *cul-de-sac de Douglas, cul-de-sac vaginorectal*), oc'h ogañ dre speur adreñv ar gouin.
- colpocléisis** ◇ **colpocleisis** ◇ **gouinanforzhañ** Direvoudañ kavenn ar gouin dre zazbevaat ha krafaelañ ar speurioù anezhi, gwezhadenn embreget da barraat ouzh fic'hioù 'zo etre c'hwezhegell ha gouin, etre kan troazh ha gouin, etre pervez ha gouin.
- colpocystopexie** ◇ **colpocystopexy** ◇ **c'hwezhegell Aanlenañ trec'houinel** Adlec'hiañ gouzoug ar c'hwezhegell dre Aanlenañ ar gouin ouzh speur araoek kavenn ar c'hof, gwezhadenn embreget da brederiañ an andalc'h troazh.
- colpocystostomie, colpocystotomie, taille vésicovaginale** ◇ **colpocystotomy** ◇ **c'hwezhegellenbenañ treuzgouinel** Gwezh surjaniel embreget e ser ar grouanezvenañ, anezhañ diraez kavenn ar c'hwezhegell dre zigeriñ an hent oberata a-dreuz speur araoek ar gouin ha speur adreñv ar c'hwezhegell.
- colpocytogramme, colpogramme** ◇ **gouinrestrad g., kolpogramm g.** Disoc'h studi kelligourel al lifrad gouin.
- colpocytologie** ◇ **colpocytology, Papanicolaou's method** ◇ **kelligrestrañ ar gouin, gouinrestrañ, hentenn b. Papanicolaou** Studi korrselladel ar c'helligoù epitelel dastumet dre al lifrad gouin.
- colpodynie, vaginodynie, vaginisme** ◇ **colpodynia, colpalgia, vaginodynia** ◇ **gouingeuzigezh b.** Argrezadoù laurus kigennoù bas ha krenn ar c'harbedenn o herzel ouzh ar c'hediañ revel (sl. *algolagnie, algopareunie*).
- colpohystérectomie** ◇ **colpohysterectomy** ◇ **gouinkrozhezvenañ** Dilemel surjaniel ar grozh hag un darn eus ar gouin.
- colpopérinéoplastie** ◇ **colpoperineoplasty** ◇ **garbedennatellañ trec'houinel** Oberatadenn amkanet da vuiaat kantalc'h ar c'harbedenn dre leiaat faout ar c'hourzh war-benn parraat ouzh izad ar gouin.
- colpopérinéorrhaphie** ◇ **colpoperineorrhaphy** ◇ **garbedennlita trec'houinel** Oberatadenn amkanet da assav ar c'harbedenn e darn pe en holl dre adsavelañ talenn ar c'higennoù hag ar faskiennoù ha dazbevaat ha krafaelañ speur ar gouin outi he unan, war-benn parraat ouzh an izad krozh-gouin.

colpopexie ◇ **colpopexy** ◇ **gouinAanlenañ** Festañ surjanel ar gouin war-benn diren an izad gouin darvezet goude ar c'hrozhevzenañ gouhollel; skourret e vez ar gouin ouzh ul lurrell lienstirenn benet diwar gigenn eeun ar c'hof.

colpoplastie, vaginoplastie, élytroplastie ◇ **colpoplasty, vaginoplasty** ◇ **gouinatelviñ** E tro angwe ar gouin, assav an organ diwar-bouez un imboud; e tro an angouin ganedigel, danzen ar gouin en e bezh.

colpoptose, coléoptose, élytroptose ◇ **colpoptosis** ◇ **kommislink g.** Izad ur speur pe an div speur eus ar gouin.

colposcopie ◇ **colposcopy** ◇ **gouinengweliñ** Imbourc'hiñ glaourgenn ar gouin ha gouzoug ar grozh diwar-bouez ur ferenn daoulagadel (kolposkop).

colposténose ◇ **colpostenosis** ◇ **gouinivoll g.** Strishadur padek ar gouin diwar gleizenn pe isteñv.

colpotomie, élytrotomie ◇ **colpotomy** ◇ **gouinenbenañ** Flañchañ speur ar gouin, gwezh embreget peurliesañ evit karzhañ un dasprouge lin eus al lestr bihan.

colpotrope, vaginotrope ◇ **colpotropic** ◇ **gouinwezher aa.** A-zivout un danvezenn o werediñ war ar gouin.

coma ◇ **coma** ◇ **koma g. -où** Stad kleñvedel naouus dre ur morvitellerezh kevret gant koll darnel pe hollel ar genskiant hag an defroù, ar santout hag ar fiñval ha, lakaet er-maez ar furmoù grevusañ, kemmir arc'hwelioù an analañ hag amredañ ar gwad; hervez derez donder ar c'homa e tiforc'her : ar c'homa defraouek (Gl. *coma vigil*) pe koma pazenn I, ar c'homa etreat (Gl. *coma d'intensité moyenne*) pe koma pazenn II, ar c'homa anerwezh pe peurgoma (Gl. *coma carus*) pe koma pazenn III, ar c'homa andizhek pe trac'homa (Gl. *coma dépassé, mort encéphalique*) pe koma pazenn IV (sl. *carus, coma dépassé, coma vigil*).

coma azotémique ◇ **uraemic coma** ◇ **koma ureek** Lankad diwezhañ ar skorted lounezh, o kevrediñ ur c'homa defraouek, laurioù strewek, enkreuz, gwelvded, iswrester, mabisvoll, analerezh Cheyne-Stokes, c'hweladoù, darc'hoal, barradoù nervel, usvec'h urea ha kreatinin.

coma dépassé, mort cérébrale, mort encéphalique ◇ **irreversible coma** ◇ **koma andizhek, trac'homa g., koma dieiltro, marv a 'n empenn** Koma don, naouus, ouzhpenn dre goll arc'hwelioù ar c'hehentiñ, dre steuz bloc'hel an arc'hwelioù struzhel (analerezh, amred ar gwad, gwerederezh tredanel an empenn); an dreistbeved ne bad nemet diwar goust ardivinkoù gwenterezh kalvezadel ha trefennadoù uswaskeiat; darvezout a ra da heul un ezwal kalonanaladel hirbad pe diwar anafoù drastus ar c'hreizennoù nervel; goude 24 eurvezhiad trac'homa e vez hollel ha dieiltro koll arc'hwelioù an nervreizhiad.

coma diabétique ◇ **diabetic coma** ◇ **koma diabetien, koma an diabet** Rouestlad d'an diabet olinsulinel, devoudet, ouzhpenn gant direizhoù ar gwadvec'h kaliom hag amoniak, gant an hogennadur er gwad eus korfoù ketonek o tec'han an akidoz, freuz ar c'hadavad alkali hag, e dibenn dedro, kouezh pH ar gwad; ent klinikel, war ur goueled skuizhnez ha treutadur, e tarvez koll ar genskiant, dourisvec'h, analerezh Kussmaul hag ar marv; parraet e vez hiziv ouzh ar c'homa diabetien dre an insulingurañ.

coma diabétique hyperosmolaire, coma diabétique par osmolarité ◇ **hyperosmolar nonketotic coma** ◇ **koma dre usgrenn anketozel, koma usgrennel anketozel, koma diabetien uc'hosmoler** Seurtad dibaot a goma o rouestlañ an diabet c'hwek, anezhañ koll don pe donoc'h a 'r genskiant ha dourisvec'h muiek (kroc'hen sec'h, teod suilhek), iswask talmerel ha terzienn, hep akidoketoz na kemm er c'hadavad alkali pe er pH, met gant gwadusvec'h natriom hag urea, ha dreist holl usvec'h glukoz paot; gwikefre ar c'homa eo usgrenn ar plasma (*uc'hosmoleriezh*) ha koll an dour hep ezvevennadur a 'r c'hevionennoù; en desped d'an diounit insulin ha d'an dourhevec'hiañ e tarvez ar marv en hanter eus an degouezhioù.

coma hépatique ◇ **hepatic coma** ◇ **koma avuien** Rouestlad marvus alies d'an ikteroù grevus ha d'ar c'hirroziou, o tedreiñ diouzh un tennad kentañ a *rakkoma*, naouus dre arouezioù nervel (dispafalad, anadenn a 'n dendrot pe reuter korzenn blom, arouez Babinski daoudu a-wechoù) ha direizhoù a 'r realezh; en un eil tennad e steuz ar strafuilhoù-se en ur lezel war o lerc'h ur c'homa sioul gant flaer an anal (*fætor hepaticus*), ur gwadusvec'h amoniak ha gwagennoù pikek trilankadek en empennvarrezañ (sl. *encéphalopathie hépatique*).

coma hypopituitaire, coma hypopituitarien ◇ **coma in hypopituitarism** ◇ **koma gougorfennien** Koma o tarvezout evel rouestlad da skorted vuiek ar c'hougorfenn (kleñvedoù Sheehan, Simmonds), delanket a-wechoù gant ur poread bihan pe ur gwezh surjanel, naouus dre ur c'hoempad kalongwazhiedel, iswrester, gwadisvec'h glukoz, reuter an izili; a-geñver e ve gant skorted lemm an uslouezhenn.

coma myxœdémateux ◇ **myxœdema coma** ◇ **koma miksedemien, koma ar miksedem** Koma amparet a-bazennadoù, istantek, hep arouez a lec'hiadur, gant iswrester hag uswask, o tarvezout a-wechoù e-kerz skorted vuiek anvezeget ar skoedenn, dezhañ un erdeb grevus.

coma vigil, coma réactif, coma stade I ◇ **light coma** ◇ **koma defraouek, koma pazenn I** Seurtad koma naouus dre ar goabrennegezh, an alfo hag ar c'hefroù; ar gouziviad a zigor e zaoulagad pa gomzer outañ.

combin-

- *anticorps qui se combinera de façon élective à un antigène* antikorf a gedio ent hanbarek ouzh un antigen
- *combinaison assurant l'accrochage du spermatozoïde à la surface de l'ovule* kediadur oc'h ober d'ar spergellig spegañ ouzh gorre ar vigellig
- *combiné de façon réversible* kediet ent eiltroüs
- *composé, combiné* kediad
- *la propriété de se combiner d'une manière spécifique à des substances étrangères* ar perzh kediañ ent spesadel ouzh danvezennoù estren
- *les acides aminés se combinent entre eux pour former des peptides* kengediañ a ra an amindrenkennoù ha furmiñ peptidoù
- *les protéines alimentaires contiennent, en combinaisons variées, vingt acides aminés naturels* proteinoù ar boued zo enno, diouzh kediadurioù diseurt, ugent amindrenken

naturel • *poison violent à l'état non combiné* kontamm taer er stad anked • *(se) composer, (se) combiner* kediañ • *sel résultant de la combinaison de l'acide chlorhydrique et du sodium* hal diwar gediañ an drenkenn glorhidrek hag an natrium.

comédocarcinome ◇ **comedocarcinoma** ◇ **komedokarkinom** g. Kankr ar vronn oc'h evodiñ diouzh ar sanioù laezhkaser, ouzh o steviañ hag o marvennañ, heñvel an troc'h anezhañ ouzh komedonoù.

comédon, acné ponctuée ◇ **stick acne, acne punctata, comedo** ◇ **akne** b. **boentaouet, komedon** g. -où Furm akne a zo an anaf anezhi ur valirenn vihan arwenn gant ur pik du en he c'hreiz, o sezañ war an dremm dreist holl, kevret gant ar soavred.

comitial ◇ **epileptic** ◇ **1 droukfellek** aa. **2 droukfellek** g. -eion **3 droukfellek** aa. 1 Gant an droukfell. 2 Gouziviad an droukfell. 3 A-zave d'an droukfell.

commande instable ◇ **wandering pacemaker** ◇ **broudalf** g. **amdeat** Migorvez diwar ma vez kreizenn c'heneh ar broud korvezek goulanker da argrezadoù ar galon o kemmañ lec'h dizehan etre ar c'hlohm god-kentez (anezhañ ar broudalf reol) hag ar c'hlohm kentez-kofig; strafuilh stadet dre ar c'halonvarrwezañ e rezh daskemmoù e neuz ar wagenn P hag e ment an esaou PR (sl. *centre d'automatisme, pacemaker*).

commensal ◇ **commensal** ◇ **1 kemmagat** aa. **2 kemmagad** g. -ed 1 O vevañ diwar goust ur bev all hep gaouiñ outañ. 2 Bev kemmagat.

comminutif ◇ **comminuted** ◇ **bruzunek** aa. A-zivout un torr o vreviñ un askorn e tammoù munut.

commission médicale d'établissement (CME) ◇ ◇ **kengor** g. **mezegel diazezadur** En amaezhiadurezh Frañs, bodadenn o deus perzh enni mezeion un ospital, un darn anezho dre wir (pennoù gwazrann pe adrann), ar re all dilennet gant o c'hetpared (skoriaded ha prezourion), da gefridi dezhi kuzuliañ amaezhierezh an ospital a-fet tuta ar c'hoskor ha merañ an diazezadur.

commisure ◇ **commisure** ◇ **1 freilh** g. **2 freilh, kroazigell** 1 Poent juntañ div elfenn gorfadurel kevelep (divweuz, malvennoù, sac'helloù). 2 Teskad gwiennoù navel o keneren furmadurioù loet e daou du an empenn; en destladur TA e reer bep tro gant *commisura* (Br. *freilh*) nemet evit an teskad gwiennoù o vont eus troad uhelañ an ilpenn d'ar gronn ruz a-ciltu hag o kroazigellañ e par an dalenn greiz : TA *decussatio pedunculorum cerebellarium superiorum*, Br. *kroazigell troadoù uhelañ an ilpenn*, Gl. *commisure* pe *décussation de Wernekink*.

commisuroplaste ◇ **commisuroplasty** ◇ **freilhatelviñ** Dazluniañ surjanel freilh ur gwask kalon.

commisurotome ◇ **commisurotome** ◇ **freilhenbener** g., **kommisurotom** g. Ardivink surjianerezh ar galon, anezhañ ul lavnenn festet ouzh biz an oberataer, outi ur gentr en araez da flañchañ ar freilhoù ezreol.

commisurotomie ◇ **commisurotomy** ◇ **freilhenbenañ** Gwezh surjianerezh kalon pe empenn, anezhañ flañchañ ur freilh.

commotion ◇ **concussion** ◇ **argrad** g. Stroñsadenn o steuziñ arc'hwelioù un organ goude un horos kreñv outañ pe ouzh ul lodenn all eus ar c'horf, ar steuzidigezh o vezañ padennek pe trebadek hep distruj eus gwiad an organ.

commotion cérébrale ◇ **cerebral concussion** ◇ **argrad an empenn** Stroñsadenn an empenn o tevoudañ raktal ur c'holl a 'r genskiant, berbad peurliesañ, met gant strafuilhoù ar c'hounerezh da arlenad boas.

commotion labyrinthique ◇ **labyrinthine concussion** ◇ **argrad ar milendall** Strafuilh arc'hwelel, hep anaf, a 'r milendall e dianlen un daraez klopenn, naoues dre un tizhadur leiek eus kleverezh ar stenioù lemm, boudinelloù ha trolernoù a rizh loadurel gant usvroudadusted ar milendall.

commotionnel : syndrome ~, **syndrome subjectif des traumatisés du crâne** ◇ **postconcussional syndrome, minor contusion syndrome** ◇ **azoniad dianargrad, aziomad bredel daraezeion ar c'hlopenn** Teskad an diazeoù merzhet gant gouziviaded 'zo goude un daraez klopenn hep grevusted : goueled enkreuz, tuadurioù gouvidel, klopennadoù muiaet gant an evezh, ar strivoù kefredel hag an trouz, angrid kalon, amvoustr, trelladurioù, badaouadoù, anglevadoù silwink, asikted, strafuilhoù an neuzid, an evezh hag ar c'hounerezh, angwerc'hadegezh; ne zinoer direizh organel ebet, ken ma renk aozerion 'zo an aziomad-mañ en un rumm gant an neurozioù (sl. *névrose traumatique*).

communautaire ◇ **community acquired** ◇ **kevredigat** aa. A-zivout ur c'hleñved dastumet e-maez a nep klañvdiadur, a-gevenep d'ar c'hleñvedoù *kurdiat* (Gl. *nosocomial*), dastumet en un diazezadur yec'hed.

communication aortopulmonaire, communication interaortopulmonaire, fistule aortopulmonaire ◇ **aortopulmonary fenestration** ◇ **kehentad** g. **aortenn-skevent, fic'h** g. **aortenn-skevent** Igorenn o kehentaat an aortenn hag an dalmerenn a-skevent en ul lec'h nes d'an deroù anezho en ezvezañs ar san dalmerel; an disc'h eo d'un darniñ eus organbarañ al lavnenn viñsek (furmardur rizophell en orin an dilhenn etre an div wazhiedenn); heñvel eo an daolenn glinikel ouzh hini dreistpad ar san dalmerel, marvus eo avat an dedro dre skorted kalon ma ne vez ket oberataet (sl. *persistance du canal artériel*).

communication coronarotriculaire, fistule coronaire-cavité droite ◇ **coronary artery fistula** ◇ **kehentad** g. **kurunerenn-kofig, fic'h kurunerenn-kavenn** Kehentad ganedigel rageeun etre ur gurunerenn hag ur gavenn galon (kentez pe gofig dehou peurliesañ).

communication interauriculaire, communication interatriale ◇ **atrial septal defect** ◇ **kehentad etre-kentezoù** Igorenn etre ar c'hentezoù a vent hag a sez diseurt hervez ma tiso'h eus ezvezañs an dilhenn, eus dreistpad an *ostium primum* pe eus anstankadur an toull vigelc'hiek; drezi e c'hoarvez ur skoev kleiz-dehou, ur c'hilred eus ar gwad gwazhiennel ha, gant an amzer, un usvent eus kavennoù dehou ar galon hag eus reizhiad talmerel ar skevent; liesañ degouezh eo eus kammneuziadoù ar galon, diouzañvet mat betek an oad a 30–40 vloaz, o tec'han ur skorted kalon da c'houde.

communication interventriculaire ◇ **ventricular septal defect** ◇ **kehentad etre-kofigoù** Kammneuziad ar galon, anezhi an dreistpad eus un igorenn etre an daou gofig diwar an darniñ eus organbarañ an dilhenn stirek pe gaherek, o tevoudañ ur skoev kleiz-dehou; hervez ment an igorenn e rummer ar c'hehentadoù e tri stroll : stroll I (kleñved Roger, skoev bihan hep uswask talmerel skevent), stroll II (skoev bras hep uswask), stroll III (skoev bihan gant uswask); er stroll IV e renker ar c'hehentadoù etre-kofigoù kevredet gant kammneuziadoù kalon all (sl. *tétralogie de Fallot*).

communic- / communiqu-

- *agitation thermique des molécules communiquant d'une façon aléatoire de l'énergie cinétique aux particules* gwrezkefrou ar molekul o c'houlankañ ent neparek gremm fiñvek ouzh ar rannigoù
- *communication bucco-nasale* boulc'h fri-genoù
- *communication entre les systèmes artériel et veineux* kehentad etre ar reizhiadoù talmerel ha gwazhiennel
- *faire communiquer deux canaux* lakaat kehent, kehentaat div ganol
- *faux-sac en communication avec l'artère par un collet* gaousac'h kehent gant an dalmerenn dre ur mulgul
- *mise en communication de deux canaux* kehentaat div ganol
- *petites cavités en communication les unes avec les autres* kavennoù munut kehent kenetrezo.

compact

- *quand il s'agit des épiphyses des os longs on nomme corticale la lame dure de tissu compact entourant la partie interne constituée de tissu spongieux* pa vez anv eus talpennoù an eskern hir e reer
- *kaennenn* eus al lavnenn galet a steuñvenn stank o c'hronañ ul lodenn diabarzh a steuñvenn spoueek, ar *vezonenn*.

compartiment ◇ **compartment** ◇ **kombod** g. Termen Liagorzhonezh despizet evel tachad eus ar bevedeg ma vez an un monedigezh korzhoniell gant ul lia, eleze ma tedro ar bec'h anezhañ e pep poent hervez an un krommenn.

compartiment corporel, compartiment liquidien ◇ **body compartment** ◇ **kombod korf, kombod dourennel** Isrann eus al liñvennoù endalc'het gant ar bevedeg hervez m'emañ e-maez pe e-barzh ar c'helligoù; er Vevedouriezh e lakaer kemm etre daou gombod : ar c'*hombod ezkelligel*, ennañ etre 5 ha 15 % eus liñvennoù ar c'horf, hag ar c'*hombod enkelligel* oc'h enderc'hel etre 40 ha 50 % anezho; er Gleñvedouriezh e reer *trede kombod* eus un dolzennad liñvennoù amskaret, da skouer er ganol vezhur da geñver un antreizh pervez.

compartimental : syndrome ~, **syndrome de compression des loges, syndrome de loge** ◇ **compartimental syndrome** ◇ **azoniad amwask an tirennoù, azoniad tirennel** Heskwad en ur stroll kigennoù eus un ezel dre an amwask e-barzh un direnn askomliennstirenek andastenn, dezhañ lies arbenn bezus, pe diavaez : spar, plastrenn re strizh, pe diabarzh : gwatoñv; ma ne lamer ket afo an amwask (dre liennstirennvenañ pergen pa vez gwatoñv), ez angriz dieiltro ar c'higennoù.

compatibilité sanguine ◇ **blood compatibility** ◇ **kempadusted b. ar gwadoù, gwadkempadusted b.** Ezvezañs kederwezh etre gwadoù daou c'houzrec'h en doare ma c'haller treuzskuilhañ gwad an eil d'egile hep ma ve dazgludet hemati ar roer gant plasma ar roadour.

compatibilité : épreuve de la ~ directe, test croisé ◇ **cross matching** ◇ **amprouad eun ar gempadusted, kevrankañ ar gwadoù, gwadkevranc b.** Amprouad renet ouzh gwele ar gouziadi evit gwiriañ kempadusted gwadoù ar roer hag ar roadour, anezhañ meskañ war ul lavnenn ur berad eus plasma ar roadour gant ur berad eus gwad ar roer; e tro un digempad A, B, O, e c'hoarvez dindan 4 pe 5 munud un dazgludadur merzhadus d'ar sell diglav.

compensateur : repos ~, **pause compensatrice** ◇ **compensatory pause** ◇ **paouez kevassav** Pad etre an dreistsistol hag ar sistol reizh war e lerc'h, hevelep ma vez ar pad etre an daou sistol a-raok ha goude an dreistsistol an daougeid rik eus ar pad etre daou sistol reol.

compensation ◇ **compensation** ◇ **kevassav pao. & g.** A-berzh ar bevedeg, erwezh leiaat pe lemel gweredoù un anaf pe un direizh dourennel war-benn adsavelañ an aoziou reol.

compensation : courbure de ~ ◇ **compensatory curve** ◇ **krommadur g. kevassav** Gourzhpleg is- pe ussezet d'un disneuziad eus al livenn, o tiren e darn pe en holl ar gweredoù anezhi, sk. : muiadur an drekwarioù gouzoug ha dargeiz o leiaat rakwar un tort kein.

compétence ◇ ◇ **araezegezh** b. Diskiblezh darbennet gant Urzh ar vezeion e Frañs, oc'h amplegañ ur gouziadur dibarek ateged gant un testeni studi arbennik pe un argerzh perzhegañ, embreget gant ur mezeg war un dro gant ar vezekniezh hollek pe gant un arbennigiezh all; e se e lakaer kemm etre ar *mezeg perzheget araetek* (Gl. *médecin qualifié compétent*) pe *perzheged* g. - *idi daouembreg* pe *daouembregour*, hag ar *mezeg arbennigour* (Gl. *médecin spécialiste*) pe *perzheged unembreg, unembregour* pe *arbennigour strizh* (Gl. *spécialiste exclusif*).

compétence immunitaire, immunocompétence ◇ **immunocompetence** ◇ **gougou g. hangaeel, hangaec'hougou g.** 1 Bezañs en ur bevedeg eus un antikorf gwadveizel (o tec'han an hangae dourennel) pe eus limfokit T (gwezherioù an hangae kelligel). 2 Perzh piaouet gant al limfokit T, roll an toazon o vezañ pouezus en amparidigezh hevelep gougou (sl. *cellules immunocompétentes, cellules thymodépendantes*).

compét-

- *acétylcholinocompétitif* aketilkolingevezer
- *cellules immunologiquement compétentes* kelligoù hangae-c'hougonek
- *faire état d'une spécialité ou d'une compétence* ober stad eus un arbennigiezh pe eus un araezegezh
- *période de compétence immuno-logique* gougouvezh hangaeañ
- *qualifié compétent* perzheged araetek, perzheged daouembreg, daouembregour
- *substance s'opposant de façon compétitive à la stimulation des récepteurs β-adrénérurgiques* danvezenn o parraat agevez ouzh fraouadur ar β-adrenvuzerioù.

complément ◇ **complement** ◇ **klokaenn b.** Trevnad kemplezh proteinoù, parenn anspesadel bezant er gwadvezh, ganti ur roll pouezus en erwezhiou difenn hangaeel, anezhi 11 kedrann niverennet eus C1 da C9 (C1 o c'hoarvezout eus an teir isrann C1q, C1r, C1s); angwezhus diouti he unan, ned a gwazhus ouzh an antigen nemet p'en deus an antikorf spesadel (*ar c'hizidikaer*) naouaet hemañ ha, lenet outañ, furmet un hangaegemplezh; lavarout a reer neuze e vez *blivaet ar glokaenn* hag, en degouezh, e komzer a *hent blivaat klasel* (Gl. *voie classique d'activation*, Sz. *classical complement pathway*), tri zennad ouzh e ober : 1) lenañ a ra ar glokaenn ouzh ar parzh antikorf eus an hangaegemplezh dre he c'hedrann C1 (*unvez naouaat*, Gl. *unité de reconnaissance*), 2) ar blivaat a dreled aristenn betek C3 dre hantererezh C1 ha C2 (*unvezioù blivaat*, Gl. *unités d'activation*) ha, da heul, betek ar c'hedrannou all (adalek C5 betek C9) 3) ar re-mañ a len ouzh kennennou ar c'helligou douger an antigen hag o distruj (*unvezioù gouren*, Gl. *unités d'attaque*); blivaet e c'hell bezañ ivez ar glokaenn gant estreget an antigenou, anv a reer neuze a *hent blivaat dazeilat* (Gl. *voie alterne d'activation*, Sz. *alternative complement path-way*); erfin, *harzerioù* pe *ezniñverioù* (Gl. *inhibiteurs*) a c'hell skoilhañ ouzh dibun ar blivaerezh; er Gleñvedouriezh e tiskouez bezañ bras ouzh bras roll ar glokaenn, pe re izel e ve ar bec'h gwad anezhi evel er c'hleñvedoù dre zrestkizidigezh, er poreoù, en imboudadurioù, en anaeziou mezhurel (kirroz, isvagadur), pe re uhel evel en erwezhiou tanjennel (kleñvedoù yud, angwazhiad a'r c'haheer kalon, ulrou) (sl. *anticomplémentaire, anticorps, auto-immunité, complexe immun, cytotoxicité, système HLA*).

complémentaire : **système** ~ ◇ **complement system** ◇ **reizhiad b. klokaennel** Teskad kedrannou ar glokaenn hag an enzimoù (konvertazioù) en araez d'o blivaat.

complémentémie ◇ ◇ **klokaennwadvec'h g.** Feur klokaenn er gwad.

complexe ◇ **complex** ◇ **kemplezh b.** 1 Termen hollek arveret da venegiñ an teskad elfennoù a ya d'ober ul luniad bonan pe gleñved. 2 Kevreted daou anaez war an un lec'henn groc'hen pe glaourgenn (livant meizh ha livant argalet, mezenbeskennno ha kantroazhfo, h.a.). 3 Er Bredelfennerezh, luniad diazez eus an darempredoù etrepersonel hag an doare ma emsavlec'h ar gouzrec'h en e geñver (sl. *castration : complexe de* —).

complexe immun, immun-complexe, complexe antigène-anticorps, complexe antigène-anticorps-complément ◇ **immune complex, antigenantibody complex** ◇ **hangaegemplezh b.** Kediad un antigen hag un antikorf spesadel, lec'hiek pe amredat, en araez da lenañ ar glokaenn; mar bez kenfeur an antigen hag an antikorf hevelep ma kenemneptuont pe mar bez reñverek an antikorf, e c'houzedont e rezh kemplezhioù dizileizh a vez fagokitet diouzhtu; mar bez reñverek an antigen, e tisoc'h kemplezhioù hezileizh a chom en amred, en arvar da zevoudañ anadennoù kleñvedel, leiek pa vez izel tolz mol an antigen, grevusoc'h pa vez bras e dolz mol, rak neuze e tarvez ur blivadur lec'hiek ha bloc'hek eus ar glokaenn hag anaeziou liesseurt a anver *kleñvedoù an hangaegemplezhioù* : anafoù war speur ar gwazhied bihan, el lounezh pergen (glomerulonefrit), er flugez all (avufo, kirroz, fibroz ar skevent), er c'hroc'hen (lupuz, skleroderma), en arzoù (liesarzo rumatoidel), h.a.

compliance ◇ **compliance** ◇ **filusted b.** Mentad treloc'hel o tenaouiñ frankadusted an organoù kleuz a-gevreizh gant gwask o endalc'had; ar c'heñver eo etre argemm an ec'honad hag argemm ar gwask ($\Delta V/\Delta P$); dewerzhet e vez dre litrou dre gentimetroù H₂O; ginad ar *filusted* eo ar *stirusted* (Gl. *élasticité*).

compliance pulmonaire ◇ **lung compliance, pulmonary compliance** ◇ **filusted ar skevent** Araezusted ar skevent da zarbenn aer a-gevreizh d'ar gwask arloet outo (arouez C_L); ent reol e vez filusted ar skevent e-tro 0,25 L/cm H₂O; dav notañ e tiskouez krommenn ar filusted izegennoù d'an ec'honadoù brasañ ha bihanañ, eleze pa vez didennet pe dardennet ar skevent, hag un uc'hegenn d'an ec'honadoù etre; ent kleñvedel e stader ul leiadur eus ar filusted e fibroz ar skevent, ur muiadur en emfizem.

compliance thoracique ◇ **thoracic compliance** ◇ **filusted ar brus** Keñver argemm ec'honad ar brus ouzh argemm ar gwask er speur anezhañ; *filusted hollel ar brus* zo sammad *filusted ar skevent* ha *filusted speur ar brus*.

compliance ventriculaire ◇ **ventricular compliance** ◇ **filusted ar c'hofig** Araezusted ar c'hofig da zardennañ; dewerzhet e vez e dibenn an diastol dre ar c'heñver etre ec'honad ha gwask; leiaet e vez da heul lies anaez : angwazhiad ar c'haheer kalon, an adiaistol, amiloz ar galon, fibroelastoz an enkalonnenn.

complication ◇ **complication** ◇ **rouestlad g.** Anadenn o tarvezout e-kerz ur c'hleñved, diforc'h diouzh an erzerc'hadoù boas anezhañ, neoazh e dalc'h an anafoù devoudet gantañ.

complic-

• *complication de la myopie* rouestlad d'an isstiuel • *complication de la syphilis tertiaire* rouestlad d'ar sifiliz tredeel • *complications cardiovasculaires* rouestladoù kalongwazhiedel • *complications de l'anesthésie* rouestladoù d'an diaereziñ • *complications nerveuses mortelles* rouestladoù nerved marvus • *état de mal asthmatique, complication grave qui peut entraîner une défaillance cardiaque droite* aroad asma, rouestlad grevus a c'hell dec'han falladur dehou ar galon • *hypertension artérielle s'accompagnant de complications* uswask talmerel diwarnañ rouestladoù • *la bronchopneumonie survient comme complication d'une affection respiratoire* dont a ra ar bronkezskaventfo evel rouestlad d'un anaez analadel.

comportement, conduite ◇ **behavio(u)r, conduct** ◇ **1 real g. -où 2 realezh b., monedigezh g. 3 ersav g. 4 monedigezh** 1 Gwezh dibarek ur bev en ur blegenn lavaret. 2 Heuliad gwezhiou ur bev adreuz d'ar plegennno ma emgav. 3 Real sellet evel respont ur bev d'un darvoud. 4 Dre leterc'had, heuliad an daskemmoù o c'hoarvezout gant un ergorenn anvev.

comportementalisme ◇ **comportamentalism, behavio(u)r-ism** ◇ **ersavouriezh b.** Teskad hentennou o kemer *arseller-ehz ergorel* ar gwezhiou da ziazez digen evit studiañ ar realezh; deveret diouzh ar vehavioerezh, evelti e hepkoront kealioù an emouezañ, ar gouzrec'h hag ar bred, nemet e tegemeront da c'houlakadurioù labour roll al laur, ar bliz hag ar bondoug; ur skourr eus an ersavouriezh, an *naoudouriezh* (Gl. *cognitivism*), a c'hounez korvo gant ar Stleneg evit ober meiz war luniadoù hag

arc'hwelioù an dezveout; soliet war hentennoù studi ergorel ar realezh, ez eo bet diorreet diskiblezhioù an *Ersavouriezh vezegel* (Gl. *médecine comportementale*, Sz. *behavioral medicine*) hag an *Naoudersavouriezh vezegel* pe *Naoudersavgurañ* (Gl. *thérapie cognitivo-comportementale*, Sz. *cognitive-behavioral therapy*) embreget e Frañs gant bredvezeion (sl. *behaviorisme, cognition*).

comport-

- *comportement alimentaire* realezh emvagañ • *comport-ement non intentionnel* real andezvenn • *comportements hostiles* realoù galen • *dispositions de l'affectivité et du comportement* tuedoù ar gantaezelezh hag ar realezh • *étude du comportement des projectiles et des lésions qu'ils causent dans l'organisme* studi monedigezh ar saezheloù hag an anafoù a zevoudont er bevedeg
- *étude objective du comportement de l'homme* studi ergorel realezh mab den • *le comportement chimique du brome est semblable à celui du chlore* heñvel eo monedigezh kimiek ar brom ouzh hini ar c'hlor • *perturbation temporaire du comportement* strafuilh dibad ar realezh • *traits de comportement* plegoù realezh • *se comporter comme un antigène* gwerediñ evel antigen • *troubles du comportement* strafuilhoù ar realezh, direizhoù realezh, mirealoù, mirealezh.

compos-

- *composant cellulaire ou tissulaire* kedrann gellig pe wiad • *composants (chimiques) du sang* kedrannoù eus ar gwad • *composants de la substance fondamentale* kedrannoù ar vondanvezenn • *composants du cannabis* kedrannoù ar c'hanab indian, kanabaozadoù, kanabinoidoù • *composé organique* bevgediad • *composé tétrapyrrolique non cyclique* kediad tetrapirrolek ankorvellek • *composés chimiques* kediadoù kimiek • *composition chimique* kenaoz kimiek • *composition isotopique* kenaoz izotopek • *concentrations d'un composant* bec'hioù ur gedrann • *dérivé phosphorylé entrant dans la composition des phosphoprotéines* deverad fosforilek kedrann er fosfoproteinoù • *dont certains composants ont été marqués par des éléments radioactifs* naoudiet kedrannoù anezhi gant elfennoù skinoberiek • *groupe de composés neuroleptiques* stroll aozadoù neuroleptek.

compr-

- *audimutité de compréhension* klevmuderezh enluzañ, anenluz ganedigel • *coefficient compris entre 0 et 1* gwezhiader gavaelet etre 0 hag 1 • *normalement compris entre 85 et 95 µm³* ent reol er gavael 85–95 µm³, etre 85 ha 95 µm³ e c'havael reol
- *normalement comprise entre 100 et 106 mmol/l* ent vonan er gavael 100–106 mmol/l, gavaelet ent reol etre 100 ha 106 mmol/l.

compresse ◇ **compress** ◇ **telt** g. Karrez bihan gazenn arveret da anroad.

compress- / comprim-

- *compresse stérile* telt dishadenn • *compression aiguë du cœur* amwask lemm ar galon • *compression violente et prolongée d'un ou plusieurs membres* gwaskadur kreñv ha hirbad eus un pe lies ezel • *compression axiale favorisant la consolidation d'une fracture* kenwask ahelel evit ober d'un askorn torret kevandiñvañ • *décompression rapide* leiaat trumm an amwask • *le lait recueilli sur une compresse* al laezh dastumet war un telt • *matière pulvérulente agglomérée par compression* danvez hueek tolpezet dre voustrañ • *méningiome comprimant le cerveau* meningiom oc'h amwaskañ an empenn • *syndrome de compression du nerf médian* azoniad amwask an nervenn greizer.

comprimé ◇ **tablet** ◇ **moustrad** g. Angevezh apotikel, furm wezher o c'hoarvezout a zavez hueek tolpezet dre voustrañ; I) hervez ar mod diounit e tiforc'her : 1) ar *moustradoù euvriñ* (Gl. *comprimés pour la voie buccale*, Sz. *oral tablets*), 2) ar *moustradoù teodel* (Gl. *comprimés pour la voie perlinguale*, Sz. *linguets*) a zalc'her dindan an teod ma tilezhont goustad endra vez suget o gwezhuzennoù gant glaourgennoù an teod hag ar genoù, 3) ar *moustradoù gouinel* (Gl. *comprimés pour la voie vaginale, comprimés gynécologiques*); II) hervez luniadur ar moustrad e tiforc'her : 1) ar *moustradoù daouwiskad* (Gl. *comprimés à double manteau*, Sz. *double coated tablet*), o c'hoarvezout eus ur graoñell greiz, anezhi un ambrougenn o tilerc'hiñ dilaosk ar gwezhuzennoù hag eus ur pallenn tro, ennañ ur wezhuzenn verziilaosk, 2) ar *moustradoù liesgwiskad* (Gl. *comprimés à couches multiples*, Sz. *multiple layer tablets*), o c'hoarvezout eus meur a welead dezho pep a ambrougenn, ar gwiskad donañ o vezañ an dilerc'husañ da zilaosk ar wezhuzenn, 3) ar *moustradoù treleizhiñ* (Gl. *comprimés osmotiques*, Sz. *gastrointestinal therapeutic systems*), o c'hoarvezout a zaou gombod, an eil oc'h enderc'hel ur polimer dourlen o tisvountañ al lia endalc'het gant egile; III) hervez pad an dilaoskiñ, e tiforc'her : 1) ar *moustradoù arzilerc'h pe feranoù* (Gl. *comprimés retard, pellets*, Sz. *pellets*), angevezh e stumm ur gantennig arblat a sanker ent surjaniel er gwiadou, o tilaoskiñ gorrek (etre ur sizhunvezh ha lies mizvezh) an danvezennoù gwezhus enklozet enno, 2) ar *moustradoù hirzilaosk* (Gl. *comprimés à libération prolongée*), moustradoù euvriñ, daou- pe liesgwiskad o tilaoskiñ gorrek (betek 24 eurvezh) o endalc'had (sl. *cachet, capsule, gélule, lentérule*).

compteur de particules ◇ **particle counter** ◇ **konter** g. -ioù **rannigoù** Ardivink amkanet da zinoñ ha da erinvañ ar rannigoù ionaus ha da imboure'hiñ ar skinaoù α, β ha γ; lies rizh ez eus : *konter Geiger-Müller*, an *diadoù pistet*, ar *c'honter dre skingannañ* (Gl. *compteur à scintillations*, Sz. *scintillation counter*), hemañ o vezañ ar c'hizidikañ.

compulsion ◇ **compulsion** ◇ **mac'henn** b. Destrizh diabarzh da ren ur real (Br. *real mac'henn*, *mac'henn realañ*, Al. *Zwang, Zwangshandlung*, Gl. *action compulsive*), pe da zerc'hañ (Br. *derc'had mac'henn* pe *mac'henn derc'hañ*, Al. *Zwangsvorstellung*, Gl. *obsession*), azon pennañ a 'n *neuroz mac'henn* (Al. *Zwangsneurose*, Gl. *névrose obsessionnelle*).

conation ◇ **conation** ◇ **1 brouer** b., **broueriñ** 2 **brouerizeh** b. 3 **brouerad** g. 1 Gwezhiañ louer. 2 Arc'hwel ar broueriñ, honad an argerzhioù gougorzh gant ar gwezhiañ louer. 3 Gwezh broueriñ.

concentration ionique du plasma ◇ **ionic concentration of the plasma** ◇ **bec'h** g. **ion ar plasma, ionblasma-vec'h** g. Feur an ion liesseurt e plasma ar gwad; en e zalc'h e mañ grenn ha kempouez trenkek-bazek ar plasma (sl. *ionogramme*).

concentration minimale inhibitrice ◇ **minimum inhibitory concentration** ◇ **bec'h skoilhus izek** Leiañ bec'h bevastaler, dewerzhed dre µg/mL, ret da herzel *in vitro* ouzh kresk ur skod bakterii.

concentr-

• *concentration de la conscience* sipadur an emouezañ • *concentration en masse* tolzvec'h • *concentration maximale des urines* bec'h uc'hek en troazh • *concentrations sanguines* gwadvec'hioù • *concentrations sériques* gwadveizvec'hioù • *concentrer un faisceau d'électrons* tolpañ un hordennad elektron • *différence de concentration* kemm bec'h • *excès de concentration sanguine* de *glucose* gwadusvec'h glukoz • *hypertrophie concentrique du ventricule gauche* usteñv kengreizek ar c'hofig kleiz • *les catalyseurs agissent à des concentrations infinitésimales* gweredus e vez an treluskerioù a vec'hioù boc'hedel • *solution concentrée* dileizhenn devec'hiet • *variations de la concentration des ions H⁺ dans le sang* argemmoù bec'h an ion H⁺ er gwad.

conception ◇ **conception** ◇ **engehentañ** Heuliad an anadennoù (kediañ, frouezhigñ) o tisoc'h gant furmidigezh ar vi.

conceptus ◇ **conceptus** ◇ **bec'hiegad** g. Termen hollek oc'h arouezñ endalc'had ar grozh vec'hiek, eleze dedaolad an engehentañ, e forzh pe stad emdreiñ e ve, rizhell pe grouell.

concomitance ◇ **concomitance** ◇ **kedwarded** b. En ul loarkrerezh, digemmed derez an ankensteud pa gemm durc'hadur ar sell (sl. *incomitance*).

concrétion ◇ **concretion** ◇ **fetisâd** g., **fetisaenn** b. Tolzenn sonnel, maenek, a orin kleñvedel o tiwanañ e-barzh ur gwiad, ur ganol pe un organ kleuz; termenoù a zo dezho un erdal ledanoc'h eget Br. *grouanenn* (Gl. *calcul*).

condens-

• *capacitance, réactance condensive, condensance* adharzded douenel • *condensateur* dougell • *condensations de cellules* douesadennoù kelligoù • *condensations pulmo-naires* douesadennoù skevent • *gouttelettes de vapeur condensée* takennoù burezh o c'hlizhenniñ • *la condensation d'une molécule de CO₂ et d'un acide cétonique* kendouesadur ur molekul CO₂ hag un drenkenn getonek • *petite plage de cyto-plasme condensé* ec'honenn vihan a gitoplasm douesoc'h • *produit de condensation de deux molécules d'urée* disoc'h diwar gendouesadur daou volekul urea • *syndrome de condensation du parenchyme* azoniad a zouesadur ar parenkim.

conditionner ◇ **to condition** ◇ **1 arbarañ** **2 hinaozañ** **3 eraozañ** **4 darblegañ** **5 bezañ amplegat da** 1 Kempenn un dra bennak e sell d'un amkan, sk. *arbarañ ul lia evit e genwerzhelaat*. 2 Kempenn azoioù ul lec'h a-fet gwrezverk, gleborverk, h.a. 3 Prientiñ ur gouziviad e sell d'un imboure'hadenn pe d'un oberatadenn. 4 Eraozañ ur bev dre zestrizh en doare ma teuy gantañ un ersav lavaret en ur bleghenn lavaret. 5 Bezañ amveziad ret d'un dra bennak.

condition(-)

• *air conditionné* aer hinaozet • *condition nécessaire et suffisante* amveziad ret ha spirus, amplegat spirus • *dans les conditions correctes d'administration* hervez ar reolennoù diounit erskrivet • *être en (bonne) condition* bezañ en aoz vat • *la condition humaine* aoz mab den • *les conditions d'un accident* amveziadoù un darvoud • *présenté sous un conditionnement coûteux* arwerzhet dindan un arbarad koustus • *réflexes conditionnés* damougoù darblegadel.

conductance électrique ◇ **electric conductance** ◇ **rended** b. Keñver etre read ar red tredan o vont gant ur reell hag ar c'hemm barr etre ar bonnoù anezhi (U⁻¹I, unanenn : ar *siemens*, arouez : S), ginad an *harzded* (Gl. *résistance électrique*, UI⁻¹).

conducteur ◇ **conductor, carrier** ◇ **anvoner** aa. A-zivout ur gouziviad o tougen ur c'henenn ezreol enkilek en e c'henotip, an doareenn geñverek o vezañ enta en arvar da zont erzerc'h e fenotip e vugale, sk. : an hemofiliezh treuzkaset d'he bugale c'hourev gant ur vamm yac'h anvoner (*treuzkaserezh trevenevel*, Gl. *transmission diagynique*).

conductibilité ◇ **1 2 conductivity** **2 conductivity** ◇ **1 readusted** b. **2 reüsted** b. 1 Perzh ar wrez, an tredan, an nervlanv da vezañ treledet gant meteier 'zo, gwiadoù 'zo. 2 Perzh ur metoù, ur gwriad da dreledañ ar wrez, an tredan, an nervlanv (ankewer eo an termen gallek er ster-mañ, sl. *conductivité*).

conductivité ◇ **conductivity** ◇ **1 reüsted** b. **2 tredanreüsted** b., **reüsted** 1 Perzh ur metoù, ur gwriad da dreledañ ar wrez, an tredan, an nervlanv (sl. *conductibilité*). 2 Rended dre unanenn regad (U⁻¹IL⁻¹, unanenn : ar *siemens dre vetr*, arouez : S/m), ginad an *harzusted* (Gl. *résistivité électrique*, UI⁻¹L).

conduction : troubles de la ~ ◇ **conduction disturbance** ◇ **mire** g. Ezreolder ar gorvez kalon diwar ur strafuilh er rehentoù emkalongaherel ma treled drezo ar wagenn vroudañ eus ar c'hloim god-kentez d'ar galon a-bezh, o tec'han direizhoù stadet dre an imboure'h klinikel en tead (istead pe ustead) hag er gorvez (migorvez, dreistsistolioù) pe dre ar c'halonvarrwezañ hepken (sl. *bloc cardiaque*).

conduction aberrante, aberration ventriculaire, bloc de branche fonctionnel ◇ **aberrant conduction** ◇ **ren** g. **gou-skoev, tolc'had** g. **barr arc'hwelel** Dehentadur ezreol a 'r wagenn vroudañ e-barzh kaher ar c'hofig, stadet dre ar c'halonvarrwezañ, anadenn dibad peurliesañ.

conduction antérograde ◇ **anterograde conduction** ◇ **raokren** g. Dehentadur reol a 'r wagenn vroudañ eus ar c'hentezioù d'ar c'hofigoù; *traren* a reer eus dehentadur rakkoulz, ezreol enta, a 'r wagenn vroudañ eus ar c'hentezioù d'ar c'hofigoù (sl. *capture*).

conduction rétrograde ◇ **retrograde conduction** ◇ **kizren** g. Dehentadur a 'r wagenn vroudañ eus ar c'hofigoù d'ar c'hentezioù, ezreol enta (sl. *capture*).

conduit auditif interne : syndrome du ~ ◇ **internal auditory meatus syndrome** ◇ **azoniad ode diabarzh ar c'hleved** Azoniad naouus, *ent klinikel*, dre ur vouzarded argreskus, gant boudinelloù, tolermioù ha strafuilhoù milendallel, nistagmuz,

seizi ha nervost an dremm, *ent neuziadurel*, dre dizhadur an nervennoù naoziet en ode diabarzh ar c'hleved : nervenn gempouez-kleved (VIII'), nervenn a 'n dremm (VII'), nervenn etreat, amwasket gant un neurinom eus an VIII.

conduct- / conduit(-)

• *aphasie de conductibilité*, *aphasie de Wernicke* ankonz enluzañ, anenluz, ankonz Wernicke • *aphasie de conduction* ankonz rehentel, ankonz gereilañ • *bronchiole terminale purement conductrice* korrvronkezenn dibenn, ganti ur roll saniañ hepken • *canal biliaire conduisant la bile* forzh vestl o kas ar vestl • *canal conduisant le sperme* kanol o saniañ ar sper • *capture atriale par conduction rétrograde* deholiañ ar c'hentez dre gizren • *capture ventriculaire par conduction antérograde* deholiañ ar c'hofig dre draren • *conducteur (physique)* reer, reell • *conducteur électrique* tredanreell, reell • *conductibilité* readüsted • *conduction antérograde* raokren • *conduction antidromique* ginren • *conduction centrifuge de l'influx nerveux* ren kreiztec'h an nervlanv • *conduction électrique* tredanren, ren • *conduction nerveuse* nervren • *conduction rétrograde* kizren • *conduction thermique* gwrezren • *conductivité* reüsted, tredanreüsted • *conduit bosselé* kanol volbosek • *conduit flexueux et pelotonné* kanol droiellek ha goustellet • *conduit osseux* kanol askornek • *conduits excréteurs* kanolioù degorzhañ • *explorer un conduit* erc'hwiliañ ur ganol • *fin* forzh vunut • *trouble de la conduction* mire • *système de conduction intraventriculaire* trevnad ren enkofigal • *voies de conduction auriculo-ventriculaire* rehentoù kentez-kofig.

condyle ♦ **condyle** ♦ **skodenn** b. Talbenn kenvellañ arrot ha balirek, kenempret peurliesañ gant ur bezel (sl. *cavité glénoïde*).

condylome ♦ **condyloma** ♦ **kondilom** g. Yoc'henn vihan kroc'hen sezet e par ar fraezh hag an organoù genel.

cône artériel, infundibulum (de l'artère pulmonaire) ♦ **conus arteriosus** ♦ **krennbikern** g. **talmerel**, **founilh** g. Rann eus rurma ar c'hofig dehou sezet diouzhtu dindan sac'helloù kef ar skevent.

cône rétinien ♦ **retinal cone** ♦ **hinkin** g. **-où al luc'hsae** Kellig skiantennel a 'l luc'hsae, araez gwelnañ ar stummoù hag al livioù, loet war ar vrzhenn hepken pe-dost, stank kenan el lodenn greiz anezhi (7 milion), tri farzh ouzh he ober : un azledad diavaez luc'hfraouidik, ur c'horf, ur penn diabarzh kevaotet gant astennad ur gellig daouvein (sl. *bâtonnet rétinien*).

cône terminal : syndrome du ~ ♦ **terminal cone syndrome** ♦ **azoniad krennbikern ar mel** Teskad an anadennoù seizi a stader pa vez anafet krennbikern ar mel alivenn : strafuilhoù ar c'helc'hstrishaerioù, direzhoù an derodiñ, aneraez glaourgennoù ar c'han troazh, ar youlc'h ha kroc'hen ar rannbarzhioù trofrazh.

confabulation ♦ **confabulation, pseudologia** ♦ **1 imbroudeñ b., imbroudeñ 2 imbroudeñ(añ) ambreek, ambren b. imbroudelek** 1 Danevell(añ) darvoudoù dec'hmeget ha lakaet da wir, real stadet e meur a vredanaez (neuroziou, psikoziou, labanded, envedi); aozerion 'zo a laka kemm etre daou stumm *imbroudeñ(añ)* : an eil, na ve ket kleñvedel dre ret (Gl. *fabulation*). 2 Egile kleñvedel, ambreek (Gl. *confabulation*) (sl. *mythomanie, simulation*).

conférer

• *conférer l'immunité à un organisme* debarañ an hangae d'ur bevedeg.

conflu-

• *aboutissant par confluence à des placards étendus* o treiñ dre zaskantañ e plakadoù ledan • *confluence des plaques de pelade* daskantadur ar plakennoù peliad • *confluent central* o Glenn etre-troadoù • *confluent postérieur* kember ar goadoù • *nodules confluent* nozelennoù daskantus.

confusion mentale ♦ **confusion** ♦ **arluz** g. Bredazoniad naouus dre steuzidigezh ar genskiant, diflosk arc'hwelioù uhel ar meiz, ezaouadur egorel-amzerel, dislen an ersavioù, enkreuz, malouen hag errizherezh, kefroù, trezerc'hadoù ha prepozioù ambreek; devoudet e vez peurliesañ gant ur pistriadur pe ur poread; parañ a ra hep arlenad, en ur lezel war e lerc'h an ankoun eus ar prantad kleñvedel (ankoun loezennek).

confus-

• *confusion entre ce que le sujet perçoit et ce qu'il ne fait que se représenter* mesk etre merzhadennoù ha derc'hadennoù • *état confusionnel* arluzegezh • *excitation confusionnelle* broudedigezh hag arluzegezh • *la réalité et l'objet satisfaisant se confondraient dans le sein maternel* e ve an draelezh hag an ergerc'henn vozius en arun e-barzh bronn ar vamm • *patients confus* klañvourion arluzek.

congénique ♦ **congenic** ♦ **kengenek** aa. A-zivout bevion a zo en o c'herz an un genom.

congénital, inné ♦ **congenital, innate, connate** ♦ **ganedigal** aa., **enganet** aa. E dalc'h stad ar bevedeg evel m'edo d'e c'hanedigezh; aozerion 'zo a laka kemm etre *ganedigal* hag *enganet* dre ober eus an doareoù *enganet* hag an doareoù *hêrezhel* daou rumm diforc'h eus an doareoù *ganedigal*.

congestion, hyper(h)émie ♦ **congestion, hyperhaemia** ♦ **darwazhiañ, darwazh** g., **gourwad** g. Hogennadur gwad e gwazhied ur parzh korf, un organ; kemm a lakaer etre an *darwazh oberiat* (Gl. *congestion active, fluxion*), strummad a-dalmerenn diwar un danijenn pe un hegeuz lec'hel, hag an *darwazh gouzañvat*, pe *dassav*, *gourwad dassavel* (Gl. *congestion passive, stase*), diwar ur reñver gwad er gwazhiennoù diwar gorreagañ pe skoilhañ an amred distro.

conglutination ♦ **conglutination** ♦ **kengludañ** Furmiñ kalzennoù bras diwar dolidigezh an hemati kizidikaet dre wered un antikorfe spesadel e diraez ar glokaenn dindan delanvad ar c'*honglutin*, danvezenn bezant e gwadvez bonan an daskiriered; *prouad ar c'hengludañ* (Gl. *test de conglutination*) a dalvez da lakaat war wel antikorfoù antiRh 'zo na vez ket an dazgwered dazgludañ ordinal evit o dinoiñ.

(-)congruent

- *hémianopsie congruente, incongruente* ledangwel kewez, ankewez.

coniose ◇ **coniosis** ◇ **euflegezh** b. Anaez diwar an uloc'h, sk. : *analeuflegezh* (Gl. *pneumoconiose*).

coniotomie ◇ **coniotomy** ◇ **kernenbenañ** Flañchañ kern dastennek ar c'harloc'henn etre ar migorn lagadenn hag ar migorn skoed, gwezh a erlec'hier a-wechoù ouzh ar briantenbenañ.

conisation ◇ **conization** ◇ **kernekaat** Ezvenañ un darn eus gouzoug ar grozh, o reiñ dezhañ stumm ur gernenn.

conjontif : **tissu** ~ ◇ **connective tissue** ◇ **gwiad g. kenglenel** Gwiad harpañ o c'hronnañ an organoù hag o leuniañ an egor etrezo, teir c'hedran ouzh e ober 1) ur vondanvezenn dezhi neuz ur gel o c'hoarvezout a zour, halioù meinel, proteinoù, mukopolisakaridoù, 2) gwiennoù kollagen, dastennek, rouedek, 3) kelligoù ; hervez e lec'hiadur hag e arc'hwel e wisk ar gwriad kenglenel meur ar furm, evel ar migorn pe an derm (sl. *cellulaire* : *tissu* ~ *sous-cutané, chorion, collagène, derme*).

conjunctive ◇ **conjunctiva** ◇ **kevresae** b. Glaourgenn tanav, boull, o wiskañ talbenn adreñv ar malvennoù ha talbenn arak boull al lagad.

conjunctivite ◇ **conjunctivitis** ◇ **kevresaefo** g. Tanijenn ar gevresae diwar an hegadur gant ur c'horf estren, ur poreadur garvevel pe an ardizh ouzh ur gouloù kreñv (sl. *cécité des neiges, kérato-conjunctivite*).

conjunctivite à inclusions ◇ **inclusion conjunctivitis** ◇ **kevresaefo ebarzhennek** Kevresaefo bolc'hennek diwar glamidi pe gonokok o tizhout an nevezc'hanidi ; ur furm all a dizh an neuñverion, kiriek d'un dallder padennek (sl. *Chlamydia, trachome*).

conjunctivopathie, connectivite ◇ ◇ **kenglennaoued** g. Anvadoù rumm, distaolet gant aozerion 'zo, a'n anaezioù a-geñver gant tizhadur ar gwriad kenglenel (sl. *collagène* : *maladie du* ~).

(-)conjunct- / conjoint- / conjug-

- *bilirubine conjuguée ou directe* bilirubin keveilet pe eeun • *bilirubine non conjuguée ou indirecte* bilirubin ankeveilet pe ameeun
- *cartilage de conjugaison* migorn kevreañ • *cellule conjunctive* kellig kenglenel • *kératoconjunctivite* kornkevresaefo • *prothèse conjointe ou fixe* dentosod anlenet pe fest.

(-)connaître / connaissance

- *connaissances particulières authentifiées par un certificat d'études spéciales* gouziadur dibarek ateged gant un testeni studi arbennik • *discipline reconnue par l'Ordre des médecins* diskiblezh darbennek gant Urzh ar vezeion • *perte de connaissance* koll (ar g-) kenskiant.

consanguinité ◇ **consanguinity** ◇ **kenwadelezh** b. Ere kerentiezh dewerzhadus e derezioù diwar ar bezoud eus un pe lies diagentiad boutin.

1 conscience, connaissance **2 4 conscience** **3 conscience, conscient** **5 conscience (morale)** ◇ **1 2 3 4 consciousness** **5 conscience** ◇ **1 kenskiant** b. **2 emouezañ** **3 emouez g., emouezañ, emouezded** b. **4 emskiant** b. **5 koustiañs** b. 1 Ent klinikel, anaoudegezh en deus ar gouziadur anezhañ e unan hag eus e amva, sk. : *koll kenskiant*. 2 Ent prederourel, an anaout an unan evel blein pennañ eus kement furm buhez 'zo, sk. : *maezienn an emouezañ*. 3 Ent vredelfennadel, arc'hwel eus ar benvegad bred, ar reizhiad merzhout-emouezañ despizet a-gevenep d'ar reizhiad diemouez, sk. : *ar reizhiad ragemouez-emouez*. 4 Ent kevredadel, an anaout an unan evel perzhour er furm-mañ furm a gedvuhez istorel, politikel, kravezel, h.a., sk. : *an emskiant vroadel*. 5 Perzh an den da varn ar realoù e-keñver divezouriezh, sk. : *tud hep koustiañs*.

conséc- / conséqu-

- *caracte consécutive à une affection oculaire* ferenflug e dianlen ur c'hleñved lagad • *cholécystite consécutive à une lithiase* bestlgellennfo heuliat d'ur c'hrouanegezh • *diminution des défenses immunitaires, conséquence de la destruction des lymphocytes T4* leiadur an difennoù hangae, dianlen da zistruj al limfokit T4 • *insuffisance rénale consécutive à l'absorption excessive et prolongée de lait* skorted lounezh e dianlen euvriñ reñverek ha hirbad laezh • *maladies et troubles consécutifs à un arrêt ou à une réduction de l'irrigation d'une partie du myocarde* klañvadurioù diwar leiañ pe astal an eroueriañ en ur parzh eus ar c'haer kalon • *remaniements consécutifs à un arrêt du développement* azveradoù dianlen da baouez an organbarañ • *simultané ou consécutif* diaser pe diaheul • *trois mois, non forcément consécutifs, deux années consécutives* tri mizvezh, hep ma ve dre ret aundalc'h, daou vloaz lerc'h ouzh lerc'h.

Conseil de l'Ordre des médecins ◇ ◇ **Kuzul g. an Urzh a 'r vezeion** E Frañs, teskad ar frammoù diabarzh ma kefleugn Urzh ar vezeion he c'hefridi reoliñ embregerezh ar Vezekniezh : ar C'huzulioù departamantel (enno etre 9 hag 24 ezel dilennet gant o c'henvreudeur), ar C'huzulioù ranndirel (enno etre 9 ha 13 ezel dilennet) o piaouañ ar gembeli diskiblezhel a ensav kentañ, ar C'huzul riezhel (ennañ 31 ezel dilennet pe anvet), gantañ kembeli diskiblezhel engalv.

conseil génétique ◇ **genetic counseling** ◇ **kuzuliañ hiloniel** 1 Hollad an araezioù hag an hentenoù engwezhiet evit andalañ ar riskl hêrezhel. 2 Nep gread mezegel renet e stern hevelep andalañ.

consensus : **conférence de** ~ ◇ **consensus conference** ◇ **kendaelez** g. **kenglev** Stroll studi bodet evit spisaat hag unvaniñ ar vonedigezh imboureñ hiñ ha mezezañ ur c'hleñved lavaret, reolennek resis kenaoz e goskor (poellgor trevnañ, kuzulierion gevarouez, barngor) hag o tisoc'h gant erbedadennoù a vez dezho talvoud gwirel.

consentement éclairé ◇ **informed consent** ◇ **asant** g. **a-c'houzvez** A-berzh ar gouziad, darbenn ar gwezhioù erwelet gant ar mezeg goude m'en deus hemañ displeget eeun ha leal an abegoù, ar modelezhioù hag ar riskloù anezho.

consolidation ◇ **1 consolidation 2 healing** ◇ **1 kevandiñvañ 2 stabiliadur** 1 Furmiñ ur glomenn askorn sonn o startaat an tammoù bet kengovlet eus un askorn torret. 2 (Mezekniezh lezennel) stad disoc'hel un naoued, anezhi arlenadoù a seller evel andredo hag angwelladus; evit an darvoudoù labour hag ar c'hleñvedoù micher, e rank ar stabiliadur bezañ kaougantet gant un testeni o teverkañ ur feur dic'houested trebadek; diwar deiziad ar stabiliadur e c'hell ar gaouad korfel bezañ andalet ent wirel.

consommation : syndrome de ~ ◇ **consumption syndrome** ◇ **azoniad beveziañ** Termen arveret a-wechoù da aroueziañ an uskaoulediañ (sl. *coagulation intravasculaire disséminée : syndrome de ~*).

consommation de luxe ◇ **luxus consumption** ◇ **bevezadur g. moedek** Bevezadur ar boued euvret en tu all d'an ezhommoù gwirion.

constipation ◇ **constipation** ◇ **goustivadur g.** Gorrekadur an trehentiñ er pervez ha, da heul, kac'hadoù daleat, skars ha dourisvec'hiek.

constitution ◇ **constitution** ◇ **genezh g.** Teskad an doareoù neuziaturel, bevedel ha bredel e piaou un hinienn (sl. *caractère, prédisposition, terrain*).

constitu-

• *antigène constitutif de la surface d'un corps figuré* antigen parzhiat e gorre un elfenn luniek • *ayant une constitution chimique complexe* dezho ul luniad kimiek kemplezh • *azote entrant dans la constitution des protéines* nitrogen war gediañ er proteinoù • *canal constitué par la réunion des conduits hépatique commun et cystique* forzh amparet gant kember san voutin an avu ha san ar gellenn • *cellule conjonctive constitutive du tissu adipeux* kellig kenglenel parzhiat er gwiañ behinel • *constituants antigéniques de l'organisme* parzhiadoù antigenel ar bevedeg • *constituants essentiels des léctihines* kedrannoù pennañ al lekitinoù • *de constitution antigénique différente* a c'henezh antigenel disheñvel • *enzyme constitutive / enzyme adaptative* enzim amparadel / enzim azasadel • *la même constitution génétique* an un glad hilel • *protéine entrant dans la constitution des myofibrilles* protein parzhiat en amparadur ar c'haherwianoù • *solutions de plusieurs constituants* dileizhennoù liesparzhiadek • *substances azotées entrant dans la constitution des nucléotides* danvezhennoù nitrogenek a-gedran en nukleotidoù • *tachycardie sinusale constitutionnelle* kalonustead godel genezhel • *tendance constitutionnelle* tued genezhel.

consultant ◇ **1 outpatient 2 consultant** ◇ **1 kuzuliadour g. -ion 2 kuzulier g. -ion 3 (kelenner) gourremzour g. -ion** 1 Gouziviad o tont da c'houlenn kuzul digant e vezeg (forc'hellek eo Br. *kuzuliad* roet dezhañ ar ster-mañ er yezh lennege). 2 Mezeg a zeu e genvredeur da c'houlenn e ali (sl. *sapiteur*). 3 (E Frañs) perzhegezh ur c'helenner skol veur embregour ospitalel gataet dezhañ goude e 65 bloaz un astenn gwaziadezh bloaz aznevezadus, oc'h ensammañ kefridioù ospitalel e-maez ar garg a benn gwazrann.

consultation ◇ **1 visit 2 consultation 3 surgery 4 outpatient department** ◇ **1 kuzuliadenn b. 2 kenguzuliad g. 3 kuzulva g. 4 gwazrann b. guzuliañ** 1 Imbourc'h ur gouziviad baleat gant ur mezeg en e guzulva. 2 Kevareizhad etre lies mezeg a-zivout un degouezh kemplezh. 3 Stavell ma ro ur mezeg e guzuliadennoù (sl. *cabinet d'équipe, cabinet de groupe*). 4 En un ospital pe en ur c'hlinik, gwazrann ma tegemerer ar guzuliadourion diavaez.

consult-

• *consultant externe* kuzuliadour diavaez • *consultation médicale* kuzuliadur mezegel, kuzuliadenn vezegel • *consulter le médecin* goulenñ kuzul ar mezeg, kemer kuzul ar mezeg, mont davit kuzul ar mezeg, mont davet ar mezeg • *le Dr A consulte entre 8 h et 11 h* an Dr A a vez o kuzuliañ etre 8 h hag 11 h • *service de consultation externe* gwazrann guzuliañ diavaez.

contact ◇ **contact, relation, touch, anchorage** ◇ **hambout** Er bredklinik, keñver an den ouzh e amved : hambout englenus an droukfellek, hambout gwrezus an darfelleg, hambout morailhet ar paranoiak, diouer hambout gant ar skizofren.

contact

• *amener en contact* degas e diastok • *amœbicides de contact* amoeb lazherioù aziastok • *anneau parfaitement mouillable en contact avec le liquide* gwalenn beurc'hlebiadus a-stok ouzh gorre al liñvenn • *appliquer une source radioactive au contact d'une lésion* arloañ ur vammenn skinoberiek a-stok ouzh un anaf • *sensibilité à un antigène après un premier contact* kizidigezh ouzh un antigen goude ur c'heraez kentañ • *contact préparant, contact déchainant* keraez eraozus, keraez diaskus • *contactologiste* gorreferennour • *contagieux par contact direct ou indirect* tredizhus dre ar stekiñ eeun pe ameeun • *contribuant à maintenir le contact entre les surfaces articulaires* o kendaolioñ da zerc'hel an talbennoù kenvellañ e diastok • *deux surfaces en contact* div c'horreenn genstok • *lentille de contact, verre de contact* gorreferenn • *liquide qui s'étale à la surface des corps avec lesquels il entre en contact* liñvenn oc'h emledañ war c'horre ar c'horfoù ma stok outo • *lors du second contact avec l'antigène* da geñver eil keraez an antigen • *portion d'os nécrosée n'ayant plus aucun contact avec le tissu conjonctif voisin* tamm askorn marvennet aet distok diouzh ar gwiañ kenglenel amezek • *toute substance qui, entrant en contact avec un organisme, provoque chez celui-ci la formation d'un anticorps* nep danvezenn, pa geraez ur bevedeg, en laka da furmiñ un antikorf.

contage ◇ **contagium** ◇ **tredizhell b.** Danvez o tougen gwezher an tredizhañ : skopadoù, kac'hadoù, h.a.

contagieux ◇ **contagiosus** ◇ **tredizhus aa.** En araez da dredizhañ, eleze da dremen eus un den d'un den all, sk. : *ur c'hleñved tredizhus* ha, dre ledanviñ, *ur c'hlañvour tredizhus*.

contagion ◇ **contagion** ◇ **tredizhañ** Treuzkas ur c'hleñved eus ur c'hlañvour d'un den yac'h; *tredizhañ eeun* (Gl. *contagion directe*) a reer eus an treuzkas dre stekiñ a zen da zen, *tredizhañ ameeun* (Gl. *contagion indirecte*) eus an treuzkas dre hanterezh un den all, ul loen, an dilhad, ar boued, h.a.

contamination ◇ **contamination** ◇ **1 tredizhañ 2 gouziblañ 3 euverñ** 1 Treuzkas hadennoù pore d'ur bev, sk. : *an tredizhañ dre stekiñ*. 2 Ebarzhiñ hadennoù lestus en ur metoù pe en ur bevedeg, sk. : *un dour evañ gouziblet gant ar c'holibazhilli*. 3 Ebarzhiñ ur gwezher argevezus en ur metoù, sk. : *ur fuadenn skinoberiek oc'h euverñ ur stêr*.

contention ◇ **1 retention, setting 2 restraint** ◇ **1 amgovlañ, disloc'h, gourfaouez, stabilaat 2 kenstrizhañ** 1 Derc'hel difiñv ur parzh eus ar c'horf dre araezioù surjanel ha / pe eunadel war-benn parañ un anaf pe dereizhañ un distummadur (sl. *appareil de contention*). 2 Emell bredvezegel dilezet hiziv, krennañ war fiñvoù ur gouziviad diwar-bouez araezioù trelloc'hel (sl. *camisole de force*).

continence ◇ **1 continence 2 competence** ◇ **1 emziouer g. 2 hezalc'h g.** 1 Diouer darempredoù revel. 2 Serridigezh klok, bonan, un tremen (gwask un trapig, toull ur c'helc'hstrishaer) (sl. *incontinence*).

contondant ◇ **contunding** ◇ **kreuus** aa. En araez d'ober anafoù dre skeiñ hep treuziñ ar c'hroc'hen (sl. *contusion, contusionner*).

contraceptif ◇ **contraceptive** ◇ **hilastaler g. -ioù** Araez arveret da skoilhañ ouzh ar frouezhigiñ; an *hilastalerioù ewrñ* (Gl. *contraceptifs oraux*) pe, hollekoc'h, *hilastalerion steroïdel*, da lonkañ pe da sankañ, zo anezho estrogenoù ha progestativoù; an *hilastalerioù lec'hiek* zo anezho ar stevelloù gourevel ha benevel, an trevnadoù enkrozhel, an aozadoù sperlazhañ engouinel.

contraception ◇ **contraception** ◇ **hilastaliñ** Dizarbenn ar frouezhigiñ hag, ent hollekoc'h, ar vrazedded (sl. *antinida-toire, contraceptif, contragestion*).

contractilité ◇ **contractility** ◇ **argrezusted** b. Perzh o deus kelligoù 'zo, kelligoù ar c'haheer pergen, da ren ul labour dre leiaat o ment.

contraction fibrillaire, contraction vermiculaire ◇ **fibrillar contraction, vermicular contraction** ◇ **argrezañ kreha-dek, argrezañ bordilhadek** Stroñsadoù bihan antrevnek e gwiennoù ur c'haheer, oc'h anadiñ a-dreuz d'ar c'hroc'hen evel ur bordilhadur preñved, azon eus ar skleroz kostezel kaheeristevus.

contraction musculaire ◇ **muscular contraction** ◇ **argrezañ (kaherel)** Leiaat ment ar c'haheergelligoù en erwezh ouzh ur broudad.

contraction musculaire isométrique, contraction musculaire statique ◇ **isometric contraction** ◇ **argrezañ keitvent-el** Argrezañ o vuiaat an tant er c'haheer hep ober d'ar c'henvell loc'hañ.

contraction musculaire isotonique, contraction musculaire dynamique ◇ **isotonic contraction** ◇ **argrezañ keittantel** Argrezañ oc'h ober d'ar c'henvell loc'hañ hep muiaat an tant er c'haheer.

contracture ◇ **contracture** ◇ **dargrezañ** Argrezañ hirbad hag andiarvenn un pe lies kigenn hep anaf kaherel.

contract-

- *à l'arrivée des ondes de contraction sus-jacentes* pa zegouezh ar gwagennoù argrezañ a-grec'h • *cellule musculaire à contraction lente et involontaire* kahergellig oc'h argrezañ gorrek hag andiarvenn • *cessation des contractions cardiaques* paouez an argrezadoù kalon • *contraction de la pupille* mabargrezañ • *contraction de sens opposé à celui du péristaltisme normal* argrezad o loc'hañ ac'hin d'an amdonnegezh reol • *contraction indépendante d'une seule fibre musculaire* argrezadenn digevret ur gaherwienn • *contraction rythmique* argrezañ korvezek • *contraction spontanée, volontaire ou réflexe* argrezañ emdarzh, diarvenn pe damougek • *contractions douloureuses* argrezadoù laurus • *contractures et hyperreflectivité* dargrezadoù hag usdamoug • *corps utérin contracturé* korf ar grozh dargrezañ • *déclencher des contractions* delankañ argrezadoù • *disparition de toute contraction* coardonnee steuzidigezh eus pep argrezañ kenurzhiat • *la contraction et l'évacuation de la vésicule biliaire* argrezad ha karzhad ar gellenn vestl • *le froid contracte les corps* strizhañ a ra ar c'horfoù o yenaat • *mouvement comportant le minimum de contraction musculaire volontaire* fiñv outañ an argrezañ diarvenn izek • *pendant la contraction* e-doug an argrezvezh • *perte de la contractilité* anargrezusted.

contractus ◇ **contragestion** ◇ **bec'hastaliñ** Mirout ouzh ar vi speriet a englenañ ouzh an enkrozhen; evel araezioù bec'hastaliñ e renker ar progesterondolc'herioù, an trevnadoù enkrozhel (sl. *antinidatoire, antiprogestatif, antiprogestérone, stérilet*).

contraste ◇ **contrast** ◇ **dargemm** g. En ur skeudenn, kemm sked etre daou boent amezek.

contraste de phase ◇ **phase-contrast** ◇ **dargemm g. arvez** Kalvezder korrgreskerel arveret da ziforc'hiñ luniadoù na vez kemm etrezo nemet dre o feuriader gouskogañ.

contraste : produit de ~ ◇ **contrast product** ◇ **aozad g. dargemm** Er skeudennerzh mezegel, danvezenn diounezet dre ar genoù, ar fraezh, ar gouin, ar c'han troazh, ar wazhienn pe ensinklet en un arzkavenn evit lakaat war wel neuz an organoù dre ar skin-, ar sten- pe an derc'hanwerañ pe dre an dason gwarellec'h; er skinlunerezh e komzer ivez eus *aozadoù skindemer, demeraerioù* (Gl. *produits radio-opaques, opacifiants*).

contre-extension ◇ **counterextension** ◇ **enebastenn** g. Diloc'hekaat parzh nezek un ezel dre sachañ war ar parzh pellec'h endra zireer un torr pe un disvellad.

contre-incision ◇ **counteropening** ◇ **adskejad** g. Eil flañchadenn graet evit aesaat karzhadur ur gwatoñv, ur pugnez, h.a.

contre-indication ◇ **contraindication** ◇ **diennegad** g. Amveziad o virout na ve arloet ur mezegadur angemeret evel azas a du 'rall, sk. : un diennegad d'an aspirin eo angreizh ar stomok (sl. *indication*).

contrenutation ◇ **counterrotation** ◇ **disnugañ** Da geñver ar gwilioudiñ, ober d'an askorn kroazell gwintañ war dreñv, an askorn belost o treiñ war raok, war-benn muiaat an treuzkiz penntir-kaezour ha leiaat treuzkizoù an digor traoñ (sl. *rotation*).

contretransfert ◇ **countertransference** ◇ **gourzhtreuzdoug** g. Teskad an erwezhiadoù diemouez digant an elfenner ouzh personded an elfennadour, ouzh an treuzdoug a-berzh hemañ pergen (sl. *transfert*).

contro-

• *controlatéral, du côté opposé, croisé* a-eiltu • *hémiplégie controlatérale flasque, puis spasmodique* ledseizi a-eiltu gwak da gentañ, neuze dasstrizhek • *hémispasme facial avec hémiplégie controlatérale* ledandag an dremm gant ledseizi a-eiltu • *hémisindrome cérébelleux homolatéral et troubles moteurs et sensitifs controlatéraux des membres* ledazoniad ilpennel a-gendu ha direzhoù loc'hadel ha santadel a-eiltu en izili • *l'alloesthésie est la perception controlatérale des sensations tactiles* an eiltuverzh pe eiltuegezh ar merzhout eo ar merzhout a-eiltu eus an erazadoù stekiñ.

1 2 contus 2 contusionnel ◇ **1 contused 2 contusional** ◇ **1 kreuet** aao., **bloñset** aao. **2 kreuadel** aa. 1 Bet anafet gant ur waskadenn pe ur skoadenn hep gloaz digor. 2 A-zave d'un anaf dre skeiñ hep gloaz digor.

contusion ◇ **contusion** ◇ **kreuad** g. Anaf dre waskañ pe dre skeiñ hep gloaz digor.

contusionner ◇ **to contuse** ◇ **kreuiñ** Ober un anaf dre waskañ pe dre skeiñ hep treuziñ ar c'hroc'hen.

convalescence ◇ **convalescence** ◇ **arbare** g., **diglañvadur** g. Prantad etre dibenn pazenn lemmded ar c'hleñved hag an distro d'ur stad nesañ gwellañ d'ar yec'hed.

convalescen-

• *centre de convalescence* kreizenn arbare, kreizenn dianospitalel • *convalescent* arbareat, arbaread, diglañvour • *durée de la convalescence* arbarevezh.

conversion ◇ **conversion** ◇ **amdreiñ** Treuzlakaat ur c'henniñv bred e rezh azonoù kreudel, loc'hadel (ar seizi da skouer) pe santadel (aneraez, gostoù) (sl. *hystérie de conversion*).

conversion : **enzyme de ~ de l'angiotensine, angioconvertase** ◇ **converting enzyme** ◇ **enzim** g. **amdreiñ an angiotensin, angiokonvertaz** g. Enzim enaozet gant an avu o treuzfurmiñ er skevent an *angiotensin I* en *angiotensin II* (gwazhi-edstrishaer kreñv) hag oc'h ezniñvañ ar bradikinin (gwazhiedfrankaer); *tolc'heriou* (Gl. *inhibiteurs*) an *enzim amdreiñ* a ziounezer ouzh an uswask talmerel hag ar skorted kalon.

1 convulsif 2 convulsif, convulsivant 3 4 convulsivant ◇ **1 convulsive 2 3 4 convulsant** ◇ **1 gliziennel 2 gliziennek 3 glizienus** aa., **kridus** aa. **4 kriduzenn** b. 1 A-zave d'ar glizi. 2 Gant ar glizi. 3 O tevoudañ glizi. 4 Nervusreer o tevoudañ glizi e rezh kridoù.

1 convulsion 2 convulsions ◇ **convulsion** ◇ **1 glizienn b. 2 glizi** s. 1 Ent klasel, nep arrezad andiarvenn, tantek pe gridek. 2 Arrezadoù andiarvenn a-stroñs o tarvezout e kigennoù 'zo pe er c'horf a-bezh, daou seurtad pennañ anezho : *glizi an droukfell* (Gl. *convulsions épileptiques*), *glizi an uswrester* pe *glizi terzhiennel* (Gl. *convulsions fébriles*) o tizhout ar vabaned peurliesañ; kemm a lakaer etre ar *glizi*, ar *c'hridoù* (Gl. *clonies*), an *andagoù* (Gl. *spasmes*), an *angrid* (Gl. *éréthisme*), an *dargrezadoù* (Gl. *con-tractures*), ar *genglav* (Gl. *trismus*), ar *gougrid* (Gl. *clonus*).

coordination ◇ **coordination** ◇ **kenurzhiañ, kedren** Trevenañ an arrezadoù oc'h ober d'ar c'higennoù kendaoliñ d'ar fiñvoù; boas eur d'ober gant *kenurzhiañ* a-geñver gant al loc'hadoù diarzoug, gant *kedren* a-geñver gant al loc'hadoù diarvenn (sl. *ataxie, incoordination*).

copochirurgie ◇ **cophosurgery** ◇ **klevsurjianerezh** g. Surjianerezh ar skouarn evit prederiañ ar vouzarded diwar otospongioz.

coproculture ◇ **fecal culture** ◇ **mondiñvañ** Dodiñ ur c'hementad mon bihan en ur metoù tiñvañ evit dinoiñ ar vezañs eus hadennoù (bazhell an tifoid, h.a.).

coprolalie, manie blasphématoire ◇ **coprolalia** ◇ **kaoc'heuriañ, kaoc'heuriadezh** b. Darlusk da leuskel ezgeurioù loudour, a stader peurgetket e-touez azonoù kleñved Gilles de La Tourette.

coprolithe, stercolithe ◇ **coprolith** ◇ **monvaen** g. Fetisâd mon kaledet bezant en oulennoù.

coprologie ◇ **coprology** ◇ **oulenouriezh** b. Studi an oulennoù, unan eus an disoc'hoù anezhañ o vezañ an *oulennestrad* (sl. *fécalogramme*).

copromanie ◇ **copromania** ◇ **kaoc'hvire** b., **kaoc'hvireadezh** b. Tech da zornata an oulennoù, da lifrañ ganto ar c'horf an unan pe an traezoù.

coprophagie ◇ **coprophagia** ◇ **kaoc'hezat, kaoc'hezadezh** b. Tech da zebriñ an oulennoù an unan.

coprophilie ◇ **coprophilia** ◇ **kaoc'hvlisa, kaoc'hvlisadezh** Bourrañ plediñ gant an oulennoù pe komz diwar o fenn.

coprostase ◇ **coprostasis** ◇ **mondassav** g. Hogennadur oulennoù e-barzh ar vouzellenn dev.

coqueluche ◇ **whooping cough** ◇ **drev** g. Pore darreuzius ha tredizhus diwar bazhell Bordet ha Gengou (*Bordetella pertussis*), naouus er bazenn vog dre gaouadoù paz andagel (*paz moug*), pep hini heuliet gant un enanaladenn hir ha yudus (alese anvad kaozeek ar c'hleñved : *paz yud*) anvet c'hoazh *kan ar c'hilhog*; o tizhout ar vugale dreist holl, grevus bras evit ar magadelled; erguret e vez dre ar *vaksin enepdrev* (sl. *vaccin anticoquelucheux*).

coquille ◇ **plaster shell** ◇ **krogen** b. **blastr** Steudell sonn plastr pe mezell o kavellañ ha derc'hel difiñv kef ur c'hlañvour gwleat.

- cor** ◇ **clavus** ◇ **klavig** g. Yoc'henn vihan kalet, laurus, o tont war dalbenn kein kenvelloù ar bizied treid diwar amwask ar c'hroc'hen etre ar votez hag an askorn, anezhi tevadur kornhaen an ezkroc'hen o sankañ en derm (gwrizienn pe beg ar c'hlavig) (sl. *durillon, œil-de-perdrix*).
- cordages tendineux** ◇ **tendinous cords** ◇ **kerdad** l. **stirennec** Poelloù stirek stignet etre ribl rez sac'helloù an trapigoù kentez-kofig ha kigennoù begennek ar c'hofigoù.
- cordes vocales** ◇ **true vocal cords** ◇ **plegoù** g. **ar vouezh** Balirennoù kempazhek a-zremm 2 cm hed stignet e lodenn draoñ rakkambr ar c'harloc'henn, anezho organ ar mouezhparañ.
- cordocentèse** ◇ **cordocentesis** ◇ **funigezwanañ** Erleml gwad diouzh gwazhienn ar funig vegel.
- cordón** ◇ **1 funiculus 2 cord** ◇ **1 pañs** g. **2 funig** b. 1 Bandenn diahed steuñvenn wenn eus ar mel a-livenn, tri daouad anezho : *pañsoù adreñv, kostezel, araok* (Gl. *cordons postérieurs, latéraux, antérieurs*). 2 Kanol ma red liñvennoù eus ur furmadur d'unan all : *funig ar begel* (Gl. *cordón ombilical*), o keneren an dorzhienn hag ar grouell, *funig ar sper* (Gl. *cordón spermatique*) funell a zo a-skourr drezi ar glidenn hag an argell, enni ar san dezouger, gwazhiad ha nervernoù.
- cordón sanitaire** ◇ **sanitary cordón** ◇ **kael** b. **yec'hedel** Linenn evezhiañ ha reoliñ dedvedet en dro d'un tiriad ma reuz ur c'hleñved dispellat.
- cordonal** ◇ **funicular** ◇ **pañsel** aa. A-zave d'ur pañs, sk. : *laurioù pañsel* (Gl. *douleurs cordonales*), diwar danaill ar strad livenn-derc'hvel ; *azoniad pañsel loc'hadel* (Gl. *syndrome cordonal moteur*), diwar dizhadur ar strad pluskenn-livenn kostezel.
- corectopie** ◇ **corectopia** ◇ **mabezlec'h** g. Ezreolder enganet pe arzeuat eus ar mab lagad, loet e-maez kreiz ar ganevedenn.
- coréoplastie** ◇ **coreoplasty** ◇ **mabatelviñ** Ratreañ surjaniel ar mab lagad.
- coréopraxie** ◇ **coreopraxy** ◇ **mabazlec'hiañ** Askreizañ surjaniel ar mab lagad bet disloet da heul oberata ar ferennlug.
- coréoscope, corescope** ◇ **corescope** ◇ **koreoskop** g. Ardivink evit imboure'hiñ mab al lagad.
- cornage** ◇ **cornage, roaring** ◇ **kornailhenn** b. Termen amprestet digant ar vezekniezh chatal evit arouezñ ur sutad garloc'henn-briant kreñv a-walc'h da vezañ klevet en endro.
- corne antérieure : syndrome de la ~** ◇ **anterior cornual syndrome** ◇ **azoniad ar c'horn araok** Teskad azonou diwar anaf korn araok ar mel (louetvelfo araok) ; seizi gwak gant steuz an damougoù, isteñv ar c'higennoù hag argrezadoù gwiennel, hep azonou a dizhadur ar strad pikernennek.
- corne cutanée** ◇ **cutaneous horn** ◇ **korn** g. (l. : **kern**) **kroc'hen** Anaf kroc'hen, anezhañ tevadur kantet kornhaenoù an ezkroc'hen war c'horre begennoù derm usteñvek, dezhañ neuz ur valirenn galet eeun pe gromm.
- cornée** ◇ **cornea** ◇ **kornsae** b. Lodenn araok treuzwelus eus kennenn stirek diavaez al lagad, al lodenn adreñv o vezañ al *lersae* (Gl. *sclère*) (sl. *kératite*).
- 1 3 coronaire 2 coronaire, coronarien** ◇ **1 2 coronary 3 coronal** ◇ **1 kuruner 2 kurunerel 3 kurunennel** 1 Adanv o spizañ un dalmerenn eus ar galon, an *dalmerenn guruner* pe *kurunerenn*. 2 A-zave d'an talmerennoù kuruner. 3 A-zave da gurunenn an dent.
- coronaire, coronarien : syndrome ~** ◇ **coronary syndrome** ◇ **azoniad kurunerel** Teskad an azonou diwar strafuilh trumm pe argammedek an amred en talmerennoù kuruner : angwazhiad ar c'haheer kalon, kevenkez (sl. *angor, infarctus du myocarde, insuffisance coronaire*).
- coronale : suture ~** ◇ **coronal suture** ◇ **mellez** b. **ar gurunenn** Kenvell etre an askorn tal hag an daou askorn kitem.
- coronarite** ◇ **coronaritis** ◇ **kurunerfo** g. Dic'henezhadur ateromatus an talmerennoù kuruner.
- coronographie** ◇ **coronagraphy** ◇ **kurunerluniñ** Skinluniñ an talmerennoù kuruner ensinklet enno un aozad dargemm (demer ouzh ar skinoù X).
- coronaropathie** ◇ **coronaropathy** ◇ **kurunerad** g. Kleñved an talmerennoù kuruner.
- coronoplastie** ◇ **coronoplasty, grinding-in** ◇ **kurunennatelviñ** Gouzelviñ dre vreolimañ kurunenn un dant.
- corps calleux** ◇ **corpus callosum** ◇ **korf** g. **karnek** Freilh bras diadrez o kevreañ an div hanterenn empenn, loet e deun ar skarr a-hed, dreist ar c'hambrou kostezel, dezhañ ur gourfenn araok krommet war draoñ, ar glin, ur c'hef hag ur gourfenn adreñv tuzum, an dalpenn (sl. *calleux : syndrome ~*).
- corps caverneux** ◇ **cavernous body** ◇ **korf keviaouek** Organ sonnidik daouat ha kempazhek loet diahed e-barzh ar c'halc'h hag an ellig.
- corps ciliaire, zone ciliaire** ◇ **ciliary body** ◇ **korf ar saeoù, korael** b. Rann eus gwazhiesae (Gl. *tractus uvéal, uvée*) ar voull lagad e stumm ur walenn loet etre ar ganevedenn hag an dolgennsae, ouzh he ober kigen ar saeoù (Gl. *muscle ciliaire*) hag askouezhioù ar saeoù (Gl. *procès ciliaires*).
- corps étranger** ◇ **foreign body** ◇ **korf estren** Korf anev bezant en ur poent eus ar bevedeg (e-barzh gwiad un organ, ur ganol pe ur gaven), o tont eus an diavaez (saezhell, traezenn lonket pe dewentet), pe furmet war al lec'h (grouanenn, tamm askorn pe migorn), nad eo ket parzhiat e danvez ar bevedeg na perzhiat en e arc'hweliou.
- corps flottants** ◇ **vitreous floaters** ◇ **flojennoù** l. (b.) **ar gwereg** Korfoù estren heloc'h stadet gant ar mezeg e-barzh an gwereg ha merzhet gant ar c'hlañvour e unan, anezho kelligoù pe un naouezenn foel pe wadliñvel (sl. *mouches volantes*).

corps jaune ◇ **yellow body** ◇ **korf melen** Aspadenn ar volc'henn vierez azv goude he fregadur ha laoskadur ar vigellig, o kreskiñ hag o vont d'ur wagrenn oc'h enborec'hañ ar progesteron; pa 'z eo bet frouezhiget ar vigellig e talc'h ar c'horf melen da greskiñ; alese e lakaer kemm etre *korf melen ar vrasedded* (Gl. *corps jaune de la grossesse*), padek, ha *korf melen ar mizioù* (Gl. *corps jaune de la menstruation*), oc'h isteñvañ hag o paouez a vorc'hañ.

corps spongieux ◇ **spongy body** ◇ **korf spoueek** Furmadur sonnidik kreizer diahed loet e nant izelañ korfoù keviaoek ar c'halc'h, o kaenañ ar c'han troazh, e c'hourfenn araok o vont d'ober ar vezenn, e c'hourfenn adreñv d'ober oignonenn ar c'halc'h.

corps vitré ◇ **vitreous body** ◇ **korf gwerek, gwereg g. -où** Tolzenn gaotek arwenn o c'henniñ boull al lagad, etre ar ferenn hag al luc'hsae.

corp-

- *cavité corporéale* kavenn a-gorf • *corps noir* korf du • *corps possédant un ou plusieurs noyaux benzéniques* kediadoù a zo un pe lies korvell benzenek en o molekul • *corps vertébraux* korfoù mellenn • *corpuscules basaux des racines ciliaires* diazkorfigoù ar gwizioù blevan • *corpuscules du tact* korfigoù stekiñ • *fluides corporels* liñvennoù ar bevedeg • *membres du corps médical* gwezhourion ar yec'hed • *perception du corps propre sans le concours des sens* merzhout anskiantennel an emgorf • *schéma corporel* goulun an emgorf.

correctif ◇ **corrective** ◇ **reizhuzenn b.** Danvezenn a ouzhpennet d'ul lia evit dic'harvañ pe daskemmañ e wered.

correct- / corrig-

- *appareil correcteur progressif* harpell dereizhañ pazennek • *chirurgie correctrice* Surjianerezh dereizhañ • *correction d'une fuite au niveau d'un des orifices du cœur* parraat ouzh ur silhad en ur gwask eus ar galon • *correction des anomalies de développement* dereizhañ gwariadoù an diorren • *correction de la texture et des contours* dereizhañ ar wiadezh hag an trolinnoù • *corriger un pied équin* dereizhañ un troad rakkamm.

correspondance rétinienne ◇ **retinal correspondence** ◇ **kenglot g. al luc'hsaeoù** Derezh keffenn etre poentoù an div luc'hsae o kevaraezañ kevredañ gweled an daou lagad; pa vez *hegenglot* (Gl. *correspondance normale*) e verzh ar gouzrec'h ur skeudenn hepken eus un ergorenn, pa vez *migenglot* (Gl. *correspondance anormale* pe *décalée*) e verzh div skeudenn (sl. *angle d'anomalie, binoculaire, synoptophore*).

corrugation ◇ **corrugation** ◇ **degrec'hañ** Roufennañ ar c'hroc'hen diwar argrezañ ar gigenn vas danloet, termen arveret a-zivout ar gousac'h dreist holl.

corset ◇ **jacket, corset** ◇ **korfenn b.** Disloc'hell pe harpell arloet ouzh ur parzh eus ar c'hef.

cortectomie ◇ **cortectomy** ◇ **pluskennezvenañ** Dazbidañ un tachad eus pluskenn an empenn, en un amkan bredyac'hadel (*leurezvenañ*) pe evit distrujañ un annon droukfell (sl. *cingulectomie, décortication, psychochirurgie, topectomie*).

cortex ◇ **cortex** ◇ **1 kaennenn b. 2 pluskenn b.** 1 Lodenn drobarzh un organ, o c'hronnañ ul lodenn greiz pe mezonenn, ha gronnet he unan gant ar pourc'had (pa vez unan). 2 Gwiskad steuñvenn louet o c'holeiñ gorre an empenn pe an ilpenn.

cortex cérébral, écorce cérébrale, manteau, pallium ◇ **cerebral cortex, mantle, pallium** ◇ **pluskenn empenn, mantell b. (empenn)** Lavenn steuñvenn louet en dro d'an div hanterenn empenn; studiet e vez ekeñver he c'hefluniadur (*adeiladezh*, Gl. *architectonie*), trevnadur he c'helligoù (*kelligadeiladezh*, Gl. *cytoarchitectonie*), staladur ar gwiennoù mielinek diouti (*mielinadeiladezh*, Gl. *myéloarchitectonie*).

cortex ovulaire ◇ **ovular cortex** ◇ **kaennenn ar vi** Lodenn drobarzh ar vi, dezhi ur roll bras en neuztarzh.

corticodépendant ◇ **corticodépendant** ◇ **kaenrankus aa., kortikoidrankus aa.** A-zivout ur gouziviad, na c'hell ket dioueriñ an diounet kaenhormon; ar bezañ kaenrankus eo ar *gaenrankusted* pe *kaenrankoud* (Gl. *corticodépendance*).

corticoïde, corticostéroïde ◇ **corticosteroid** ◇ **kortikosteroid g., kortikoid g., kaenhormon g.** Nep hormon borc'het gant ar gaenuslounezhenn hag an danvezennoù deveret pe gevanaozet dezho perzhioù bevedel heñvel.

corticomimétique ◇ **cortisone-like** ◇ **kaengeveler aa. & g. -ioù** (Danvezenn) a zo heñvel he gwered ouzh hini ar c'hortikoidoù.

corticoprive ◇ **corticoprival** ◇ **1 kaenisvorc'hek aa. 2 kaenisvorc'hel aa.** 1 Gant skorted ar gaenuslounezhenn (*kaenisvorc'h*, Gl. *insuffisance corticosurrénale*). 2 A-zave d'ar c'haenisvorc'h.

corticorésistance ◇ **corticorésistance** ◇ **kaenharzusted b.** Stad m'emañ klañvourion 'zo a chom diwered warno ar c'haen-hormonoù.

corticosurrénal ◇ **adrenocortical** ◇ **kaenuslounezhel aa., kaenel aa.** A-zave da gaennenn ar wagrenn us-lounezh (pe kaenuslounezhenn).

corticosurrénal : hormones ~es ◇ **adrenocortical hormones** ◇ **hormonoù l. (g.) kaenuslounezhel, kaenhormonoù** Hormonoù borc'het gant ar gaenuslounezhenn : a) ar *mineralokortikoidoù* (an *aldosteron* ar pennañ anezho), b) ar *glukokortikoidoù* (ar c'hortizol), c) an *androgeneier* (sl. *androgène, glucocorticoïde, minéralocorticoïde*).

corticothérapie ◇ **corticotherapy** ◇ **kaengurañ** Mezegadur dre ar c'hortikoidoù hag an ACTH.

corticotrope ◇ **corticotrop(h)ic** ◇ **kaenwezher aa.** O werediñ ent hanbarek war ar gaenuslounezhenn.

corticotrope : hormone ~, corticotrophine, ACTH ◇ **adenocorticotrop(h)ic hormone, ACTH** ◇ **hormon kaenwezher, kaenwezher g., ACTH** Hormon borc'het gant ar rakgougorfenn, 39 amindrenkenn azigorvell en e volekul, o kentraouiñ borc'h-

erezh ar gaenuslouezhenn; reolet e vez borc'hadur an ACTH dre gorwered emleiaat gant ar gwadvec'h kortizol; diounit a reer an ACTH en hevelep ennegadoù hag ar glukokortikoid pe c'hoazh evit azluskañ an uslouezhenn goude ur c'haengurañ hirbad.

corticotrope : **substance libératrice de l'hormone** ~, **corticolibérine**, **CRF**, **CRH** ◇ **corticotropin releasing factor**, **CRF**, **corticotropin releasing hormone**, **CRH** ◇ **paren** b. **elloiñ an hormon kaenwezher**, **elloerenn** b. **ar c'haenwezher**, **CRF**, **CRH** Polipeptid borc'het gant ur greizenn nervel loet er gouzerc'hvel, degaset gant ar reizhiad porzh gougorfennel betek ar rakgougorfenn ma reol borc'herezh an hormon kaenwezher.

cortisol, **17-hydroxycorticostérone**, **hydrocortisone** ◇ **cortisol** ◇ **kortizol** g., **hidrokortizon** g. Unan eus an 11-oksikortikosteroidoù, glukokortikoid nes d'ar c'hortizon ha gwezhusoc'h egetañ (sl. *11-oxycorticostéroïdes*).

cortisolémie ◇ **cortisolaemia** ◇ **gwadvec'h** g. **kortizol**, **kortizolwadvec'h** g. Feur kortizol er gwad (etre 190 ha 630 nmol/l da 08 h, etre an drederenn hag an hanter eus ar feuriou-se da 16 h).

cortisone ◇ **cortisone** ◇ **kortizon** g. Unan eus an 11-oksikortikosteroidoù, glukokortikoid borc'het gant ar gaenuslouezhenn; reoliñ a ra arc'hwelioù ar gwiad kollagen ha skoilhañ ouzh an erwezhoù foel hag allergek; diounezet e vez ouzh al liesarzfo henek, an urloù, remm lemm an arzoù, an aroad asma, al lupuz eritematus lemm strewek, ar skleroderma hag ar gwadnaouedoù yud; e arverañ a reer evel hangaevlinaer.

cortex / corti-

- *cataracte corticale* ferrenluc a-gaenenn • *couches corticales* gwiskadoù ar gaenenn • *cécité corticale* dallentez a-bluskenn
- *cortex occipital* pluskenn gilpenn • *cortex visuel* pluskenn weledel • *la corticale de l'os* kaenenn an askorn, ar gaenaskornenn
- *épaississements des corticales osseuses* tevaennoù eus kaenenn an eskern • *épreuve de cortisone-glucose* proudad ar c'hortizon-glukoz
- *hyperostose corticale infantile* kaenustreuz askorn mabanel • *les corticales des os courts et plats* kaennoù an eskern berr ha plat.

corymbiforme ◇ **corymbiform** ◇ **kuchennadek** aa. Adanv o spizañ un dispuilhad a zo an elfennoù anezhañ stallet e bodadoù dispartiet gant entremezioù kroc'hen bonan.

coryza, **rhume de cerveau** ◇ **coryza**, **common cold** ◇ **sifern** g., **anoued** g., **choberd** g. Frifo diwar virus, naoues dre stankad ar fri gant beradur, streviadoù ha droug gouzoug.

coryza spasmodique, **rhume des foins** ◇ **allergic coryza**, **hay fever** ◇ **sifern allergek**, **sifern ar bleuñv** Maeloù lemm ar fri hag ar malvennoù o tarvezout da vare ar vleuñvidigezh, sellet evel ur furm asma.

cosmétologie ◇ **cosmetology** ◇ **gwezeladouriezh** b. Studi hag embreg an angevezhoù hag ar c'halvezderioù amkanet da brederiañ kened ar c'horf.

1 3 cosmobiologie **2 cosmobiologie**, **exobiologie**, **astrobiologie** ◇ **1 3 cosmobiology** **2 exobiology**, **astrobiology** ◇ **1 Oablvevoniezh** b. **2 Hanvevoniezh** b. **3 Kosmobiologiezh** b. 1 Studi gwered an anadennoù oablel war ar bevedegoù. 2 Studi an anadennoù o tennañ da vezañs ha da zoareoù ar beved war blanedennoù koskor an heol pe er c'hevanv (war an hanblanedennoù). 3 Arz da zarlakaat delanvad kefluniadur mentoniel an astroù war yec'hed an dud.

cosmopathologie ◇ **cosmopathology** ◇ **Oabgleñvedouriezh** b. Rann eus an Hinadouriezh o plediñ gant kleñvedusted ar parennoù oablel (Heol, Loar, skinou oablel).

côte ◇ **rib** ◇ **kostenn** b. (**kostezenn**) l. : **kostoù**, **kestad** Askorn plat, hir ha kromm, parzh en atel ar brusk; kenvellet eo an daouzek daouad kostoù ouzh mellennoù ar brusk en adreñv hag ar seizh kentañ hepken ouzh ar glerenn en araog dre ur migorn piaouel (*kostoù* end-eeun), ar pemp all (*falskostoù*) o vezañ pe staget ouzh ar glerenn dre ur migorn boutin (teir anezho), pe distag o gourfenn arak (an div izelañ).

côte cervicale ◇ **cervical rib** ◇ **kostenn c'houzoug** Kostenn dreistniver, en un pe en daou du, kenvellet ouzh ar seizhvet mellenn c'houzoug.

coton hydrophile, **ouate** ◇ **absorbent cotton-wool** ◇ **kotoñs** g. **dourlen**, **poulc'h** g. (**kotoñs**) **dourlen** Gwiennoù kotoñs dezho ur barr desunañ uhel arveret d'ober lienadurioù (sl. *byssinose*, *gossypol*).

coup de chaleur ◇ **heat stroke** ◇ **taol** g. **gwrez** Teskad darvoudoù, marvus alies, devoudet gwech gant skinata an heol (*darheoliad*, Gl. *insolation*), gwech gant ur wrez reñverek o tec'han an dourisvec'h (hinad grizias ha gleborek, salioù a 'n ijinnoù), naoues dre ur glopennost taer, ar c'hoant kousket, steuz ar borc'hadurioù, c'hweladoù, trezerc'hoù, an alfoiñ hag ar semplañ.

coup de fouet : **douleur en** ~ ◇ **coup de fouet** ◇ **laur** g. **fiblus**, **fiblad** g. Poan feuls trumm oc'h erzerc'haat freg ur stirenn da geñver arrezadur ur gigenn (freg eus stirenn ar seul, eus stirenn uhelañ ar gigenn daoubennek); a-wechoù e tarvez ar freg e korf ar gigenn he unan.

coup du lapin ◇ **whiplash injury** ◇ **daraez** g. **gouzoug dre c'hwistad**, **darc'hougad** g. Frapad c'hwimm-dic'hwimm oc'h ober d'ar mell gouzoug plegañ trumm, en ur c'harbed darstoket diardreñv da skouer; ar riskl eo flastrañ ur vellenn ha gourzhbreviñ ar mel a-livenn.

coup de poignard abdominal ◇ **abdominal stabbing pain** ◇ **poan** b. **gof goustilhus**, **goustilhad** g. **kof** Laur taer ha trumm en ur poent eus ar c'hof oc'h erzerc'haat deroù un ampeleñfo diwar dreloezañ.

couperose, **acné rosacée** ◇ **acne rosacea** ◇ **bourbon** s., **akne** b. **livrin** Anaf kroc'hen loet en dremm, naoues dre un darwazh gant usvoll ar gwazhied ha, hogos bepred, tizhadur gwagrennoù ar soav (soavred, krugrennoù ha burbuennnoù akne, rinofima zoken) (sl. *acné rosacée*).

- courant d'action** ◇ **action current** ◇ **red gweredel g., gweredred g.** Red tredan diwar ar c'hemmoù barr (*gweredvarroù*, Gl. *potentiels d'action*) dec'hant gant ar vroudedigezh e kennenn ar c'helligoù nerval pe gaherel o werediñ.
- courant de lésion** ◇ **injury potential** ◇ **red anafel, anafred g.** Red tredan oc'h anadiñ en ur c'haheer er paouez etre un annon anafel hag ar parzhioù bonan; stadet e vez dre ar c'halonvarrwezañ e-doug lankad lemm angwaziad ar c'haheer kalon.
- courbature** ◇ **stiffness** ◇ **kaherost b.** Laur kaherel ha santadur ogvez anglevet da heul un embreg kigenneel start pe da geñver ur stad a derzhienn (ent kaozeek : *kig-torr*).
- courologie** ◇ **adolescent medicine** ◇ **Kenevouriezh b.** Skourr eus ar Vabouriezh o plediñ gant ar grennarded.
- couveuse** ◇ **incubator** ◇ **klouarell b.** Ardivink amkanet da zerc'hel en ur gwrezverk arstalek ar vugale ganet kent termen pe en ur stad a izilled.
- covid-19*** ◇ **covid-19** ◇ **covid-19 g.** Gwreskanv diwar an Am. *corona virus disease*, kleñved dinodet e deroù 2020 pe un tammig a-raok. Bennozh d'ur c'hemm despizadur en deus gallet an ABY diskleriañ ur bedreuziad. En hevelep mare hag en holl rieziou war-bouez nebeut ez eus bet lusket diarbennoù, iskriv a-walc'h evit ul lod anezho : enkae, keulfe, sinañ an unan un aotre evit mont da vale, traezennoù “dialuskel” (Gl. *plages dynamiques*), ur pas evit mont d'ar preti, pe d'ar skeudennva, pe d'an ospital, hep ankounac'haat ar maskl, a denner evit evañ ur banne er ur c'hafedi, adlakaet avat evit mont d'ar privezioù! Tud e-leizh o deus kollet o c'horvoder pa na felle ket dezho asantiñ d'an ensinkladur, an anvaksinidi o vezañ lakaet en disparzh. An aotrouniezhoù o deus arveret an aon, ar gourdrrouz ha gevier e-leizh evit dougen an dud da vezañ ensinklet, evit un anaez nebeut trankus a-benn ar fin, niver an dud marvet diwar ar covid o vezañ bet kresket diwar-goust kleñvedoù all hag ivez diwar deandizhoù en Herberc'htioù evit an Henaded Amzalc'hiat. A-c'houde tri bloaz ez eus anadet un toullad miweredoù : marv, amgalonennfo, kalongaherfo, trombozioù, h.a. (sl. *vaksin, Organisation mondiale de la Santé, OMS*).
- coxal** : **os** ~ (anvad kent : **os iliaque**) ◇ **coxa** ◇ **askorn g. al lez** Askorn daouat o vont gant an askorn kroazell d'ober atel al lestr, teir lodenn anezhañ : *askorn ar glun* (TA *ilium*, anvad kent : Gl. *ilion*), *askorn koazek* (TA *ischium*, anvad kent : Gl. *ischion*), *askorn kaezour* (TA & Gl. *pubis*).
- coxalgie** ◇ **1 coxalgia 2 coxotuberculosis** ◇ **1 lezost b. 2 torzhellegezh b. al lez** 1 Laur al lez. 2 Torzhellegezh kenvel al lez (etre podenn askorn al lez ha penn an askorn morzhed).
- coxarthrie, coxarthrose** ◇ **coxarthrosis** ◇ **lezartroz g.** Remm henek anfoel kenvel al lez, da azonou dezhañ al laur, un andrafed arc'hwelel, un dedro gorrek hep tuadur d'an tromaot.
- coxite** ◇ **coxitis** ◇ **lezfo g.** Arzfo al lez.
- coxopathie** ◇ **coxopathy** ◇ **lezarzd g., lezanaez g.** Anvad rumm evit klañvadurioù al lez.
- crachat, expectoration** ◇ **sputum, expectoration** ◇ **skopad g., kraost g.** Danvezenn vonan pe gleñvedel distaolet eus ar forzhioù analañ dre basaat; kemm a lakae ar vezekniezh klasel etre *skopadoù moneizek* (Gl. *crachats nummulaires*), ront hag arblat, an dorzhellegezh, *skopadoù perlezek* (Gl. *crachats perlés* Laennec) an astma, *skopadoù merglek* (Gl. *crachats rouillés*) ar skeventfo.
- crampe** ◇ **cramp** ◇ **glaz b. -où** Argrezad grezvarrek andiarvenn, padennek, kreñv ha laurus a 'r c'higennoù rizennek.
- crampe des écrivains** ◇ **writer's cramp** ◇ **glaz ar skrivagnerion** Midant jestre naouus dre zargrezadur kigennoù an dorn pa skriver; deskrivañ a reer ivez *glaz ar violoñserion* (Gl. *crampe des violonistes*).
- craniectomie** ◇ **craniectomy** ◇ **kloppenvezvenañ** Dazbidañ ur pann askorn eus ar c'hloppenn, peurliesañ evit e adstummañ kent e addezezañ da geñver un atelvadenn (sl. *cranioplastie*).
- craniographie** ◇ **craniography** ◇ **kloppennluniñ** Skinluniñ ar c'hloppenn.
- craniologie** ◇ **craniology** ◇ **Kloppennouriezh b.** Rann a 'n Denoniezh o plediñ gant studi ar c'hloppenn.
- craniométrie** ◇ **craniometry** ◇ **Kloppennvuzulierezh g.** Skourr a 'n Denoniezh o plediñ gant muzulierezh eskern ar c'hloppenn.
- cranioplastie** ◇ **cranioplasty** ◇ **kloppennatelviñ** Ratreañ ur bouc'h er c'hloppenn diwar-bouez un imboudenn askorn pe un osod metal pe mezell.
- craniorrhée** ◇ ◇ **pilhonver g.** Naouez dre ar fri eus liñvenn benn-kein e dianlen ur c'hehent emdarzh pe daraezel etre ar c'hloppenn hag ar fric'hargadenn.
- craniosténose, craniostynose** ◇ **craniostenosis, craniostynosis** ◇ **kloppennisvoll g., mellezdlidad g.** Soutadur rak-koulz ar mellezioù o tevoudañ aneroubar ha mineuziadoù diseurt a 'r c'hloppenn hag a 'n dremm (tourbennegezh, louebennegezh, tric'hornbennegezh, beskebbennegezh), tizhadoù nerval, direizhoù lagadel, uswask talmerel.
- craniotabès, craniomalacie** ◇ **craniotabes** ◇ **kloppennvloodad g.** Boukadur eskern ar c'hloppenn stadadus dre an teuta o tarvezout gant ar vabaned, e dianlen al lec'h.
- craniotomie** ◇ **craniotomy** ◇ **kloppennenbenañ** Gwezh Nervsurjianerezh, anezhi digeriñ ar c'hloppenn, enbenañ o vont adalek an trepanañ betek dazbidañ ur pann askorn.
- créatine** ◇ **creatine** ◇ **kreatin g.** Danvezenn nitrogenek, kedrann a bouez e kimiezh ar bevedeg; dre gediañ gant an drenkenn fosforek ez a da fosfagen (pe fosfokreatin) oc'h amparañ mammenn c'hremm ar c'higennoù.
- créatinémie** ◇ **creatinaemia** ◇ **kreatinwadvec'h g.** Feur kreatin er gwad (feur reol : 206 µmol/l er gwad klok, 23-30 µmol/l er gwadveiz pe er plasma).

- créatinine** ◇ **creatinine** ◇ **kreatinin** g. Bazenn greñv, deverad korvellekaet (laktam) diwar ar c'hreatin; dizeul ar c'hreatinin endeuet a dalvez da vuzuliañ feur ar silañ bloueigel (sl. *clairance rénale*).
- créatininémie** ◇ **creatininaemia** ◇ **kreatininwadvec'h** g. Feur kreatinin er gwad (feur reol : 60-130 µmol/l).
- créatininurie** ◇ **creatininuria** ◇ **kreatinindroazhvec'h** g. Feur kreatinin en troazh, dewerzhet evel kementad ezvevennet dre kg tolz korf dre 24 h (feur reol : 0,13-0,22 mmol/kg/j).
- créatinurie** ◇ **creatinuria** ◇ **kreatindroazhvec'h** g. Feur kreatin en troazh, dewerzhet evel kementad ezvevennet dre 24 h (feur reol : < 0,75 µmol/j).
- créatorrhée** ◇ **creatorrhoea** ◇ **kac'husvec'h** g. **protid**, **protidver** g. Feur reñverek ar protid en oulennoù (sl. *azotorrhée*).
- crèche** ◇ **day nursery** ◇ **magouri** b. Diazezadur da amkan dezhañ degemer war an deiz magadelloù yac'h.
- crémation** ◇ **cremation** ◇ **pulluc'hañ** Deviñ ha ludañ ar c'helanoù.
- crématorium** ◇ **crematorium** ◇ **pulluc'hva** g. Lec'h, stavell pe rann en ur c'himiati ma luduer ar c'horfoù.
- crème** ◇ **cream** ◇ **koavon** g. Angevezh apotikel da von ennañ un danvezenn druz a arloer ouzh ar c'hroc'hen, tanavoc'h eget an *ogan* (Gl. *pommade*) dre benn ar vezañs ennañ eus ur feur dour brasoc'h, e se aesoc'h da lifrañ ha da walc'hiñ kuit.
- cremnophobia** ◇ **cremnophobia** ◇ **neinarur** g. Amgren kleñvedel rak an uhelder, ar goullo, an torrodoù.
- créthérapie** ◇ **crenotherapy** ◇ **eiengurañ** Arverañ yac'hadel an dourioù melar el lec'h ma vammennont (sl. *hydro-thérapie, thermalisme*).
- crépitant** : **râle** ~, **crépitation**, **râle vésiculaire** ◇ **crepitant rale**, **crepitation** ◇ **ronk** g. **straklus** Laennec a geñverie ar ronkoù straklus gant draskadenn an holen lakaet war ur bladenn domm, anezho trouzoù munut, paot ha reoliek klevet dre fourradoù e dibenn an enanalañ; o stadañ a reer alies e deroù ar skeventfo.
- crépitation** ◇ **crepitation** ◇ **gouriñviañ**, **gouriñviad** g. Trouz dibarek klevet e diabarzh ar c'horf e lies degouezh : *a*) pa fiñver an daou damm eus un askorn torret (*gouriñviad askornel*, Gl. *crépitation osseuse*), *b*) pa vruzuner ar c'haouled dre bouezañ war ur gwatoñv (*gouriñviad gwadel*, Gl. *crépitation sanguine*), *c*) pa bouezer war un emfizem endan-groc'hen (*gouriñviad erc'hek*, Gl. *crépitation néigieuse*), *d*) pa frof ur stirenn tanijennet ouzh speur an irgenn, *e*) pa bouezer war osteosarkomoù 'zo gronnet gant ur glorenn askorn (*gouriñviad parchek*, Gl. *crépitation parcheminée*).
- crepusculaire** : **état** ~ ◇ **crepuscular state** ◇ **stad** b. **amheoliek** Koabrennegezh ar genskiant gant ur gouziviad gouest da ren c'hoazh oberoù damgevazas ha da berzhiañ tamm pe damm er gedvuhez, furn leiek an arluz.
- cretin** ◇ **cretin** ◇ **cretin** g. -ed Gouziviad ar gretiniezh.
- crétinisme** ◇ **cretinism** ◇ **cretiniezh** b. Dilerc'hegezh vuiek, naouus dre an andiorre kefredel (rannad meiz > 20), aneroubar kreudel (korrded) hag istead a 'n arc'hwelioù bevedel, a-geñver gant ar skoedanvorc'h (pennsac'h broreuziat diwar an negezh iod, skoedennisteñv).
- crétinoïde** : **état** ~ ◇ **cretinoid state** ◇ **stad** **cretinoidel** Stad nes d'ar gretiniezh, naouus dre un derez skañvoc'h a zilerc'hegezh.
- Creutzfeld-Jakob** : **maladie de** ~, **pseudosclérose spastique de Jakob** ◇ **Creutzfeld-Jakob disease** ◇ **kleñved Creutzfeld-Jakob** Anaez o tarvezout e-tro an oad a bemont vloaz, naouus *ent clinique* dre gevreted un envedi, arouezioù ilpennel, un azoniad ampickernennek, strafuilhoù pikernennek ha kahegridoù trebadek, *ent neuziadurel* dre ur spongioz, distruj an neuron, ur glioz astrokittel er bluskenn, er rizennegoù hag en derec'hvel (elfennoù ret da ziogeñ an deznaou); dedreiñ a ra d'ar marv dindan un nebeut mizvezhioù; renket e vez en empennaouedoù goulemm spouevanek treuzkasadus; ur prion eo ar gwezher kiriek dezhañ (sl. *prion*).
- criblage** ◇ **screening** ◇ **kroueriañ** Arglask ar c'hlon-mañ klon e-barzh ur bank DNA.
- criminalistique** ◇ **criminalistics** ◇ **kouladurezh** b. Teskad ar c'halvezderioù amkanet da bivadiñ ar c'hirieg pe ar reuzied d'ur c'houl (mezekniezh lezennel, korfvuzulierezh, biz-pe hillouc'hadoù).
- criminologie** ◇ **criminology** ◇ **kouloniezh** b. Studi ar c'houloù hag ar goulerion.
- crise** ◇ **crisis** ◇ **1 eizigenn** b., **c'hwezenn** b. **2 barr** g., **barrad** g., **gwaskad** g. **3 eizikvan** b. 1 Kemmadur trumm e stad ur c'hlañvour, diougan ar pare hogos bepred : diskenn a-daol eus ar gwrezverk, ustroazh, usc'hwez. 2 Darvoud anaazel trumm, anezhañ peurliesañ erzerc'had spanaennek ur c'hleñved henek : *barr c'hweliiñ* (Gl. *crise de vomissements*), *barrad anfiñvel* (sl. *akinétique* : *crise* ~), *barrad asma* (sl. *asthme*), *barrad droukfell* (sl. *épilepsie*), *gwaskad divilhennfo* (Gl. *crise d'appendicite*), *gwaskad kalon* (Gl. *crise cardiaque*). 3 Prantad dedreiñ bonan a-geñver gant an oad : *eizikvan an dizonañ* (Gl. *crise de sevrage*), *eizikvan ar c'hrennoad* (Gl. *crise d'adolescence*), *eizikvan c'hourevel* (sl. *andropause*), *eizikvan venevel* (Gl. *âge critique, ménopause*) (sl. *accès, attaque*).
- crise bilieuse**, **flux bilieux** ◇ **biliousness** ◇ **gwaskad bestlus** Azoniad o tarvezout a-vareadoù, naouus dre c'hweladoù ha darc'hoaladoù bestlek, kevret gant kernad ha tizhadur ar stad hollek.
- croisement** : **signe du** ~, **signe de Gunn** ◇ **Gunn's crossing sign** ◇ **arouez** b. ar **c'hroaziañ**, **arouez Gunn** Koll treuzwelusted talmerennoù al luc'hsae oc'h ober dezho kuzhat ar gwazhiannoù el lec'hioù ma kroaziont, arverk arterioskleroz.
- crosse aortique** : **syndrome de la** ~ ◇ **aortic arch syndrome** ◇ **azoniad gwareg an aortenn** Stankadur barroù bras gwareg an aortenn (talmerennoù karotidel hag endan-drebez), naouus ent klinikel dre 1) arouezioù heskwad e kigennoù an izili krec'h hag

an dremm, 2) arouezioù padennek heskwad an empenn en tiriad mellkein-diazpenn (trolern, dauweled, klopennad), en tiriad karotidel (un pe ledseizi, ankornz), pe trebadek (boukadur empenn), 3) arouezioù lagadel (leiadur ar gweled, ledangwel) diwar heskwad an empenn pe al luc'hsae; azoniad stadet e stern kleñvedoù foel (kleñved Takayashu, talmerennfo ividig, hollaortennfo hennadek) pe anfoel (darvoll pe enrec'h aortenn, kleñvedoù ganedigel), aterom.

crossectomie ◇ **crossectomy** ◇ **kammellezvenañ** Dazbidañ kammell ar wazhienn spis bras hag an adwazhiennoù diouti, ergemennet evit prederiañ teuc'helloù an izili traoñ.

croup ◇ **croup**, **laryngeal diphtheria** ◇ **kroup g.** Diferiezh ar c'harloc'henn, ar brizhliennoù o steviañ ar forzh analañ hag o lakaat ar gouziviad war var da vougañ.

croupal ◇ **croupous** ◇ **kroupel** aa. A-zave d'ar c'hroup, sk. : paz ha mouezh kroupel ar vugale difterek.

croût-

- *commissures recouvertes de croûtelles* freilhoù, krac'hennoù warno
- *desquamation croûteuse* gourc'hennañ trouskennek
- *squames croûteuses* gourc'hennadoù trouskennek.

cruenté ◇ **bleeding** ◇ **arwadus** aa. A-zivout ur gorread o wadañ goude lamet diwarnañ e amwiskad.

cruralgie ◇ **cruralgia** ◇ **morzhedost** b. Laur er vorzhed.

cryanesthésie ◇ **cryanaesthesia** ◇ **1 yenaneraez g.** **2 yendieraeziñ** 1 Anverzhout ar yender. 2 Dieraeziñ dre yenaat.

cryobiologie ◇ **cryobiology** ◇ **Yevevoniezh** b. Studi gwered ar gwrezverkoù izel war ar bevion.

cryocautère ◇ **cryocautery** ◇ **yenezer g.** -ioù Ardivink oc'h ober gant ar yenion dec'hanet dre ziaezhennañ CO₂ sonnel arveret da zistrujañ ar gwadadoù en arloer outo (sl. *cautère*).

cryochirurgie ◇ **cryosurgery** ◇ **Yesurjianerezh** g. Arloañ ar gwrezverkoù izel ha gourizel e-kerz un oberatadenn (en Droazhadouriezh hag el Lagadouriezh pergen) (sl. *cryopexie*, *cryothérapie*).

cryoconservation ◇ **cryoconservation** ◇ **yevirerezh g.**, **yevirouriezh** b. Arloerezh ar gwrezverkoù gourizel ouzh an danvezioù bevel evit o mirout.

cryoglobuline ◇ **cryoglobulin** ◇ **krioglobulin** g. Immunoglobulin (Ig) gantañ ar perzh da zierc'hiñ dindan 37°C gwrezverk ha da zileizhiñ da 37°C en-dro; rummadur Brouet a laka kemm etre ar *rizh I* : Ig monoklonel (IgM) stadet er gwadnaouedoù yud, ar *rizh II* : an IgM κ monoklonel hag an IgG poliklonel, stadet er poreoù dre viruz an avufo C, ar *rizh III* : lies seurtad Ig poliklonel, stadet e meur a gleñved.

cryoglobulinémie, **cryoproteinémie** ◇ **cryoglobulinaemia**, **cryoproteinaemia** ◇ **gwadkrioglobulinegezh b.**, **gwadkrioproteinegezh** b. Bezañs e plasma ar gwad eus un pe lies rizeh gammaglobulin, eus strolloù an IgG pe IgM pergen; dre zierc'hiñ e steviont oaled ar gwazhied pe ez anafont ar speur anezho dre c'henel hangaegemplezhioù, o tevoudañ anaezioù diseurt : purpura, azoniad Raynaud, gwadliñv ar glaourgennoù, tromboz al luc'hsae, arzfoioù, dibaotoc'h nervnaouedoù santout-loc'hañ; kevredet e vez alies gant gwadvakroglobulinegezh Waldenström, ul leukemiazh limfoidel henek, ur c'hleñved unanhangaeel, ur pore, un avufo henek, h.a.

cryomassage ◇ **cryomassage** ◇ **skornrimiañ** Kalvezder leuñviñ, anezhañ donrimiañ gant skorn.

cryopathie ◇ **cryopathy** ◇ **yenanaez** g. Anvad rumm ar c'hlañvadurioù diwar ar yenion : milher, revadoù, troad peñse, troad foziou.

cryopexie ◇ **cryopexy** ◇ **yeAanlenañ** Gwezh yesurjianel, anezhañ festañ ur gwad dre arloañ outañ ur gwrezverk gourizel, sk. : *yeAanlenañ al luc'hsae* (Gl. *cryorétinopexie*) (sl. *cryothérapie*).

cryoprécipité ◇ **cryoprecipitate** ◇ **yendierc'had** g. Kemplezh dizileizh proteinoù dec'hanet dre wered ar yenaat, sk. : disoc'h eus dierc'hiñ krioglobulin ar plasma yenaet dindan 37°C.

cryopréservation ◇ **cryopreservation** ◇ **yewarediñ** Mirout ur gwad, ur rizehell en ur gwrezverk gourizel (−196°C) war-benn trezerc'hel an arc'hweleoù bevedel anezho.

cryothérapie ◇ **cryotherapy** ◇ **1 yengurañ** **2 yewezhiañ**, **yewezh** g. -ioù 1 Arverañ yac'hadel ar yenion : strinkadennoù yen, farlokadoù gleb, yalc'hadoù skorn, h.a. evit diren ar gouliñv hag ar gwatoñvoù, arloadoù kloridenn vetil, erc'h CO₂ war-benn dec'han un dieraeziñ lec'hiek. 2 Gwezh yesurjianel, anezhañ diraez ur poent eus ar c'horf dre ur sont (*yesont*) a zegaser ar beg anezhañ d'ur gwrezverk gourizel (*yewrezverk*, Gl. *cryotempérature*, en degouezh etre −80°C ha −160°C) diwarbouez un amred nitrogen pe argon liñvel, kalvezder arveret da zistrujañ kelligoù kankrek, da adfestañ ul luc'hsae dispeget pe diroget, h.a.

crypte ◇ **crypt** ◇ **groc'hig** b. -où Kavenn vogodek diwanet diwar an emouinañ eus amwiskad un organ.

cryptite ◇ **cryptitis** ◇ **groc'higfo** Tanijenn en ur c'hroc'hig, peurgetket en unan eus *godoù ar fraezh*, anvet diagent *groc'higou Morgagni*, anezho nantoù etre peulioù ar fraezh.

cryptogénétique, **cryptogénique** ◇ **cryptogenetic** ◇ **kelardarzh** aa. A-zivout un anaez n'eur ket deuet a-benn c'hoazh da zizoleiñ an natur pe an arbenn anezhañ (sl. *essentiel*, *idiopathique*).

cryptorchidie ◇ **cryptorchism**, **cryptorchidism** ◇ **kelgellegezh** b. Ezvezañs eus un pe a 'n div glidenn er gousac'h da heul un diskenn diglok (*kellamzehent*, Gl. *arrêt de migration du testicule*); hervez loadur ar glidenn e reer anv a *gelgellegezh*

varlenngousac 'hel, barlennel, kofel (Gl. *cryptor-chidie inguinoscrotale, inguinale, abdominale*); da ziforchiñ eo diouzh ar *c'hel-lezlec'h* (*ectopie testiculaire*), anezhañ loadur ar glidenn emaez treug reol an dehentñ (*kellvizehent*, Gl. *aberration de migration testiculaire*).

- cubitus valgus** ◇ **cubitus valgus** ◇ **ilin g. ezkamm** Gwariadur war ziavaez eus an arvrec'h astennet, ganedigel pe daraazel.
- cubitus varus** ◇ **cubitus varus** ◇ **ilin enkamm** Gwariadur war ziabarzh eus an arvrec'h astennet, ganedigel pe dianlen d'un torr eus poleenn ar paler.
- cuir chevelu** ◇ **scalp** ◇ **brigenn g.** Kroc'hen ar c'hloppenn.
- cul-de-sac pleural, sinus pleural** ◇ **recess of pleura** ◇ **aspleg g. ar c'hrezoù** Linenn drañ kavenn ar c'hrezoù ma kendalc'h ar grezenn a-skevent gant ar grezenn a-speur.
- cul-de-sac vaginal** ◇ **fornix of vagina** ◇ **krommenn b. ar gouin** Parzh eus kavenn ar gouin loet en dro d'ar min tañch, ouzh e ober un aspleg araok, un aspleg adreñv ha daou aspleg kostezel.
- 1 cul-de-sac vagnorectal, excavation recto-utérine** **2 cul-de-sac de Douglas** ◇ **1 recouterine pouch, recouterine excavation** **2 vesicorectal pouch, vesicorectal excavation** **1 2 Douglas's pouch** ◇ **1 kleuz g. youlc'h-kroz, ouf g. 2 kleuz youlc'h-c'hwezhi-gell** 1 Bogod eus kavenn an ampeleñ loet etre ar gouin hag ar youlc'h. 2 Bogod eus kavenn an ampeleñ etre ar c'hwezhi-gell hag ar youlc'h gant ar gourev. 1 2 Anvad roet gant aozerion 'zo d'ar bogod ampeleñ dirak ar youlc'h ken gourev, ken benevel, gant aozerion all etre youlc'h ha gouin hepken.
- culdocentèse** ◇ **culdocentesis** ◇ **oufezwanañ** Sankañ un nadoz er c'hleuz youlc'h-kroz war-benn karzhañ al liñvenn bezant ennañ pe erlemel ul lommad anezhi evit e imbourc'hiñ.
- culdoscopie, pelyoscopie** ◇ **culdoscopy** ◇ **oufengweliñ** Torengweliñ treuzgouinel (sl. *caelioscopie*).
- culmen** ◇ **culmen** ◇ **kon g. -ioù** 1 Lodenn uhelañ eus tolbezenn grec'h ar skeventenn gleiz, eleze an teir rann, a-gern, a-dor hag a-gein eus an kez tolbezenn. 2 Flipezenn grec'h ar preñv ilpenn.
- culminectomie** ◇ **culminectomy** ◇ **konezvezañ** Lemel surjiañel kon ar skeventenn gleiz.
- cultiver** ◇ **to cultivate, to grow** ◇ **tiñvañ** 1 Lakaat garvevion pe kelligoù gwia del da vevañ ha da greskiñ en ur metoù azas. 2 A-zivout garvevion pe kelligoù gwia del, bevañ ha kreskiñ en ur metoù kalvezadel.
- culture bactérienne** ◇ **bacteria culture** ◇ **tiñvañ bakteri** Lakaat bakteri da diñvañ *in vitro*, an darn vuiañ war veteier anev, kimiek; un nebeut kerentiadoù avat (*Rickettsia, Chlamydia*) hag ar viruz ne c'hellont neriñ nemet e-barzh kelligoù bev.
- culture cellulaire** ◇ **tissue culture, cell culture** ◇ **tiñvañ kelligoù, tiñvañ gwia del** Derc'hel bev greadoù kelligoù o tont eus organoù denel pe loenel (louezhi marmouzion, skevent rizheloù denel, yoc'hennoù) pe eus klonoù; arveret e vez an tiñvadurioù kelligel er Vakteriouriezh evel meteier tiñvañ ar viruzoù ha bakteri 'zo (sl. *culture bactérienne*).
- culture : bouillon de ~** ◇ **meat infusion** ◇ **anvervad g. tiñvañ** Angevezh diwar gig anvervet arveret da diñvañ garvevion 'zo.
- culture : milieu de ~** ◇ **culture medium** ◇ **metoù g. -eier tiñvañ** Angevezh bev pe anev, liñvel pe sonnel, arveret da diñvañ ar bakteri, ar viruzoù pe ar c'helligoù gwia del.
- culture**
 • *champignons de culture* foue gounit • *culture de tissu* tiñvrezh gwia del • *injection d'un filtrat de culture de Brucella melitensis* ensinklañ ur silad eus tiñvadur *Brucella melitensis* • *levure en culture sur milieu de Sabouraud* govev o tiñvañ war metoù Sabouraud.
- cuprémie** ◇ **cupraemia** ◇ **gwadvec'h g. kouevr, kouevrwadvec'h g.** Feur ar c'houevr er plasma, reol etre 16 ha 31 µmol/l.
- cuprorrachie** ◇ **cuprorrachia** ◇ **keinvec'h g. kouevr, kouevrgeinvec'h g.** Feur ar c'houevr el liñvenn benn-kein, reol etre 1,57 ha 2,35 µmol/l.
- cupule** ◇ **cupula of the ampullar crest** ◇ **kiban b. -où (kribenn ar gloestr)** Tolzenn gaotek en dro da stereokil ar c'helligoù skiantennel eus kribenn ar gloestr.
- curare** ◇ **curare** ◇ **kurar g.** Meskad alkaloid douhennet eus lies seurtad plant, en o zouez *Strychnos toxifera*, bet arveret gant hemole'herion Suamerika, dezhañ da wezhuzenn an *D-tubokurarin*, darlaosker kaherel andivleinekaus.
- curarisant** ◇ **curariform, curare-like, curarizing** ◇ **1 kurarvanek aa. 2 kurarvaneg g. -eion** 1 Gant gweredoù heñvel ouzh re ar c'hurar, o virout pergen ouzh an nervlanv a ziraez ar c'higennoù. 2 Danvezenn gurarvanek.
- curarisation** ◇ **curarization** ◇ **kurariñ** 1 Pistriañ gant ar c'hurar. 2 Arverañ ar c'hurar pe ur c'hurarvaneg e ser an dieraezñ gant ar surjiañel en oberatadennoù war ar brusk pe ar c'hof, gant ar vredvezeion en tredangridoù, gant ar boreourion e prederiadur an tetanoz.
- cure** ◇ **cure** ◇ **1 kur b., kurañ, mezegañ 2 kur, kurañ, kuradur g., yac'haat, yac'hadur g. 3 kurva g., kurdrev b. 4 kur, kurvezh b.** 1 Prederiañ, prederiadur ur c'hlañvour. 2 Pareañ, pareadur ur c'hlañvour, ur c'hleñved. 3 Hanva amkanet da brederiañ klañvourion. 4 Chomadenn en ur c'hurva, en ur gurdrev.
- cure hygiénodiététique** ◇ **kur yec'hedel-mezhurel** Teskad an diarbennoù hinvael, mezhurel ha breadel a yae d'ober, a-raok oadvezh ar c'himigurañ, mezegadur torzhellegezh ar skevent, o talvout hiziv c'hoazh evit un darn da brederiañ kleñvedoù analadel 'zo evel an asma pe an usvoll bronkez.

cur-

• *centre de cure* kreizenn gur, kurva • *centre de post-cure* kreizenn diangur, diangurva • *curable* kuradus, pareadus • *curatif* "kurañ, "pareañ • *cure chirurgicale* kurañ surjaniel, yac'haat surjaniel • *cure climatique* kur hindrev, hingur • *cure de jeûne* kur yuniñ, yungur • *cure de sommeil* kur gousked, hungur • *cure marine* kur vordrev, morgur • *cure thermale* kur havdrev, havgur • *curiste* kurad -ed • *prévention, traitement curatif* ergurañ, kurañ • *dose curative* doen kurañ • *établissement de cure* kurdi • *station de cure* kurva, kurdrev • *traitement curatif des hyperthyroïdies* prederiadur yac'haat ar skoedusvorc'h • *tumeurs malignes curables* yoc'hennoù yud kuradus, yoc'hennoù yud pareadus.

1 curet(t)age 2 curage 3 curet(t)age aspiratif ◇ **1 2 curettage 3 aspiratory curettage** ◇ **1 loagarzhañ, karzhellañ 2 bizkarzhañ 3 sungarzhañ** Goulloñ ur gavenn naturel (kroz, arz) pe get (annon ur pugnez) diouzh an danvezioù kleñvedel a zo enni 1 diwar-bouez ul *loa garzhañ* pe *karzhell* (Gl. *urette*), pe 2 gant ar biz, pe 3 dre ur c'*horzan sunañ* (Gl. *canule aspirante*).

curie ◇ **curie** ◇ **kuri** g. -où Unanenn skinoberiegezh (arouez Ci) kevatal da 3,7.10¹⁰ digevanad dre eilenn; er reizhiad etrevroadel ez eo bet erlec'hiet outañ ar *bekrel* (arouez Bq) kevatal d'un digevanad dre eilenn.

curiepointure ◇ **interstitial irradiation, radium implantation** ◇ **kuriwanañ** Prederiañ kankroù 'zo dre sankañ er yoc'henn nadozioù a zo radiom enno (sl. *césium 137, télécésiumthérapie*).

curiethérapie ◇ **brachytherapy** ◇ **kurigurañ** Enstedañ ur vammenn skinoberiek ouzh ur yoc'henn a venner distrujañ; ar radiom 226 danvezet da gentañ (*radiomgurañ*) zo bet erlec'hiet outañ ar c'heziom 137 hag an iridiom 192; diforc'hiñ a reer an *enkurigurañ* (Gl. *curiethérapie interstitielle*) pa loer ar vammenn skinoberiek e-barzh ar yoc'henn hag an *neskurigurañ* (Gl. *plésiothérapie*) p'he loer en he c'hefin; notañ ar c'hemm kemeradurioù a zo etre Sz. *brachytherapy* ha Gl. *brachythérapie* (sl. *brachythérapie*).

Cushing : **maladie de ~, syndrome de ~, hypercorticisme glycocortico(stéro)ïde** ◇ **Cushing's disease, Cushing's syndrome** ◇ **kleñved Cushing, azoniad Cushing, kaenusvorc'hegezh** b. **c'hlikokortikoidel** Klañvadur o tizhout ar vaouez yaouank dreist holl, naouus dre vorrder a 'n dremm, a 'r gouzoug (choug bual) hag a 'r c'hef, uswask talmerel, kaheristeñv gant asikted, osteoporoz, skorted c'hanadel, stirgennadoù mouk, gourblevegezh a 'n dremm, a-wechoù gwadusvec'h glukoz hag elruz, devoudet gant kaenusvorc'hañ ar glikokortikoid; orin hemañ eo pe 1) ur reñver ACTH diwar un adenom a 'r rakgougorfenn pe un anaf a 'r gouzerc'hvel, kevret gant kaenuswe daoudu (en degouezh-mañ hepken e komz aozerion 'zo a *gleñved Cushing*), pe 2) ur yoc'henn guñv pe yud a 'r gaenuslounehenn pe ur mezegadur hirbad gant ar c'hortikoidoù, hag en dro-mañ e ra an kez aozerion anv a *azoniad Cushing*; dervaet e vez deznaou ar gaenusvorc'hegezh gant feur uhel ar c'hortizol en troazh, hag an orin gougorfennel anezhi gant usvec'h an ACTH.

cutanéolipectomie, dermolipectomie ◇ **cutanéolipectomy, dermolipectomy** ◇ **kroc'henbehinezvenañ** Gwezh surjianerezh gwezeladel, anezhañ dazbidañ ur gennad a 'r c'hroc'hen hag a 'r gwiad behinel danlec'h, oberatadenn renet en un amboaz heneuziañ ar feskennoù, an divlez, an divvorzhed.

cutiréaction ◇ **cutireaction** ◇ **erwezh** g. **kroc'henel, kroc'henerwezh** g. Erwezh foel o tarvezout er poent eus ar c'hroc'hen ma voe dodet, goude araskañ, ul lomm eus danvezennoù 'zo (dedaolad garvel, protein loenel pe struzhel, h.a.) pa vez ar gouziviad kizidikaet pe allergek outo; embreged da gentañ gant an tuberkulin da zinoiñ bezañ un annon torzhellek; arveret ivez da zeznauiñ anaezioù darwalladel (astma, sifern allergek, linadell, ekzema).

cutisation ◇ **cutization** ◇ **kroc'henaat** A-zivout ur glaourgenn (gouin, gweuz), argalediñ ha sec'hañ goude balirañ ent padek aziavaez.

cut-

• *administrer par voie sous-cutanée, administrer en sous-cutanée* diounit endangroc'hen, diounit (ent) dangroc'henel • *cuticule* kennan • *infection cutanéomuqueuse* poread kroc'hen-glaourgenn • *lambeau cutané* drailhenn groc'hen • *lésions cutanéomuqueuses* anafoù kroc'hen ha glaourgenn • *percutané, transcutané* tregroc'henel • *percuti-réaction, test percutané* erwezh tregroc'henel, tregroc'hen-erwezh • *prélever un lambeau cutané* dezvenañ un drailhenn groc'hen • *stimulus cutané* kentrigenn groc'henel • *tissu cellulaire sous-cutané* gwiad kelligaouek endan-groc'hen.

cyanogène ◇ **cyanogenous** ◇ **dulaseiat** aa. O tevoudañ an dulaz.

cyanopsie ◇ **cyanopsia** ◇ **glazarnewel** g. Kammzerc'hañ un arliv glas war an traoù a weler (sl. *chromatopsie*).

cyanose ◇ **cyanosis** ◇ **dulaz** g. Livrezh arc'hlas oc'h anadiñ war an amwiskadoù pa sav feur an hemoglobin direet dreist 5 g dre 100 mL a 'r gwad korwazhiedel; diforc'hiñ a reer an *dulaz a-greiz* diwar skorted an oksigenañ (skevent- ha bronkezanaezioù, heptreug, darvoll talmerenn-gwazhienn skevent), hag an *dulaz a-drobarzh* diwar usdouhenn an oksigen gant ar gwiadoù trobarzhel (dassav, gorrekaat an amred e dianlen ar skorted kalon, gwazhiedstrishaat trobarzhel)

1 cyanosé, cyanotique 2 cyanotique ◇ **1 cyanotic, cyanosed 2 cyanotic** ◇ **1 dulazek** aa. **2 dulazel** aa. 1 Gant an dulaz. 2 A-zave d'an dulaz.

cybernétique ◇ **cybernetics** ◇ **Sturoniezh** b. Diskiblezh o plediñ ouzh gwikefreoù an arc'hañ, ar reoliñ hg ar c'hehentiñ en ijinennoù hag er bevion.

cybernine ◇ **cybernin** ◇ **kibernin** g. Danvezenn dedaollet gant ur wagrenn emborc'hañ, he c'hefridi gouluzañ dre gorwered ar stimolinoù o reoliñ arc'hwelerezh ar wagrenn, sk. : ar *gonadokrinin*, peptid dedaollet gant ar vierez a vez o reoliñ borc'herezh ar gonadostimulin, hormon o fraouaat ar vierez he unan.

cycle cellulaire ◇ **cell cycle** ◇ **nergor g. ar gellig** Kenheuliad lankadoù emrannañ ar gellig; goude ur prantad eraozañ *G1* (Sz. *gap 1*), e teu al lankad *S* (Sz. *synthesis*, enaozañ an histonou, enaozañ hag azeilañ an DNA), al lankad eraozañ *G2* ha, d'e heul, al lankad *M* (*mitoz*) o klozañ an nergor hag o tifourkañ war ul lankad *G1* nevez (sl. *caryocinèse, cinétique cellulaire, mitose*).

cycline ◇ **cyclin** ◇ **kiklin g.** 1 Anvad genadel ur c'herentiad proteinoù dezho ur roll diazez e nergor ar gellig. 2 Kerentiad bevastalerioù pevar c'horvell kempieg en o molekul, daou stroll bras anezho : an *tetrakiklineier* hag an *antrakiklineier*.

cyclique : maladie ~ ◇ **cyclic disease** ◇ **kleñved kelc'htroek** Kleñved o tedreiñ ent arreadek dre an un tennadoù kenheuilh. **cycte** ◇ **cyclitis** ◇ **koraelfo g.** Tanijenn gorf ar saeoù, kevret alies gant tanijenn ar ganevedenn (*koraelenvezfo*, Gl. *iridocyclite*) (sl. *corps ciliaire*).

cycluduction, circumduction ◇ **cycluduction** ◇ **kelc'htuañ** C'hwelañ al lagad en dro d'ar c'hwelahel a-saezh.

cyelopexie ◇ **cyelopexy** ◇ **koraelenlenañ** Festañ surjaniel korf ar saeoù (sl. *corps ciliaire*).

cycloplégie ◇ **cycloplegia** ◇ **koraelseizi g.** Steuz an argeidañ diwar seizi korf ar saeoù (sl. *corps ciliaire*).

cyctospasme ◇ **cyctospasm** ◇ **koraelandag g.** Sonnadur padek an argeidañ diwar andag korf ar saeoù (sl. *corps ciliaire*).

cyctosporine ◇ **cyctosporin** ◇ **kiklosporin g.** Polipeptid dedaolet gant ur foue, *Tolypocladium inflatum*, arveret evel hangaeastaler en treuzplantadurioù organ.

cyctosthénie ◇ **slight cyctothymia** ◇ **kelc'henniñ g., kelc'hnoa g. leiek** Hervez an aozerion, daouvlenegezh ankleñvedel a'n nerzh bevedel, pe furm skañv eus ar psikoz maniakel-gouvidel.

cyctothérapie, cycloradiothérapie ◇ **rotation therapy** ◇ **c'hwelskingurañ, c'hwelgurañ** Seurtad skingurañ treantus ma reer d'ar gouziviad ha d'ar vammenn skinou X treiñ an eil e-keñver egile.

cyctothymie ◇ **cyctothymia** ◇ **1 kelc'hnoa g., genezh g. kelc'hnoael, kelc'henniñ 2 kelc'henniñ g., psikoz g. kelc'hnoael** 1 Genezh naous dre zistabiled an noa, hemañ o tremen lerc'h ouzh lerc'h dre lankadoù eniñv uhel (sarted, diskelusted, embregusted) ha lankadoù eniñv izel (melkoni, emdenn, gorregezh). 2 Muiadur kleñvedel eus doareoù ar genezh kelc'hnoael, o c'hoarvezout eus resmiadoù *mania* (broudedigezh, kefroù, realoù reñverek skoilhous ouzh nep kedvuhes) hag eus resmiadoù *melankoliezh* (gouvid don, mantridigezh, argeziadoù emlazhañ), bet lakaet warnañ lies anvad abaoe an 19^t kantved : Gl. *folie circulaire, folie périodique, folie à double phase, psychose maniaco-dépressive, psychose cyctothymique, psychose bipolaire, trouble bipolaire, bipolarité* — Br. *follezh kelc'htroek, follezh trovezhiek, follezh daoulankadek, psikoz maniakel-gouvidel, psikoz kelc'hnoael, psikoz daouvlenek, strafuilh daouvlenek, daouvlenegezh* (sl. *abattement, dépression, humeur, manie, mélancolie, sthénie*).

cycl-

• *composé cyclique* kediad korvellek • *composé non cyclique* kediad ankorvellek • *cycle de l'uréogénèse* kor an urebarañ, pargor an urea • *cycle de multiplication* nergor • *cycle évolutif des vers parasites de l'ordre des Trématodes* emdrogor ar preñved arvevat eus urzhad an Trematod • *cycle pileaire* blevgor • *cycle respiratoire, cycle ventilatoire* kor an analañ, analgor • *substances hétérocycliques* danvezennou heterokiklek.

cyndres urinaires ◇ **urinary casts** ◇ **rolledoù l. (g.) troazh** Kranennadoù korrgreskerel moulet e tuellennoù al lounezhad hag o c'houzediñ en troazh, a ziforc'her e : 1) *rolledoù anlun*, boull, kolloidel pe koarek, anezho mukoproteinoù, 2) *rolledoù* amparet gant *eljennoù luniek* (kelligoù epitelel, hemati, leukokit, greunigoù), ar re-mañ diwezhañ o tennañ evezh ar c'hleñvedour.

cyndrurie ◇ **cyndruria** ◇ **troazhrolledegezh b.** Bezañs rolledoù a orin lounezhel en troazh.

cyphoscoliose ◇ **kyphoscoliosis** ◇ **treuzrakwar g.** Distummadur diadrez ha diasaezh eus al livenn.

cyphose ◇ **kyphosis** ◇ **rakwar g.** Krommadur diasaezh hag argeinek war dreñv eus al livenn.

cystadénome ◇ **cystadenoma** ◇ **kistadenom g.** Yoc'henn guñv evodet diouzh parenkim ur wagrenn, enni kavennoù kistek.

cystalgie, cystodynie ◇ **cystalgia** ◇ **c'hwezhihelllost b.** Nervost ar c'hwezhihell.

cystectasie ◇ **cystectasia** ◇ **c'hwezhihellusvoll g.** Frankadur ar c'hwezhihell, bonan pe gleñvedel.

cystectomy ◇ **cystectomy** ◇ **c'hwezhihellzevenañ** Dazbidañ darnel pe hollel ar c'hwezhihell.

cysticerose ◇ **cisticercosis** ◇ **kistikerkoz g.** Kleñved devoudet gant *kistikerk* o tedreiñ e-barzh ar bevedeg, dreist holl *Cisticercus cellulosae*, larvenn eus *Taenia solium*; an un kleñved gant ar moc'h eo ar *gourc'he*; tredizhet e vez an den dre zebrif kig moc'h gourc'heek damboazh, ar c'histikerk o vont da festañ ha da razekaat en nerved kreiz, el lagad, er c'higennoù hag er gwiad endan-groc'hen.

cystine ◇ **cystine** ◇ **kistin g.** Amindrenkenn sulfurin, kediad daou volekul kistein, bezant evel kedrann e lies protid (seromalbumin, fibrin, insulin).

cystinose ◇ **cystinosis** ◇ **kistinoz g.** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotzomek enkilek, naous dre ur strafuilh hollek eus kennevid ar c'histin, hemañ o koc'hioniñ er gwiadoù (reizhiad retikuloendotelel an avu, ar felc'h, ar skevent, ar gwerblennoù); ur furm da dezaorismoz eo; deraouiñ a ra gant ar maban dre ul lounezhad tuellennel henek, kevret gant astal ar c'hreskiñ, lec'h, stad hollek fall, terzhienn, usvent an avu, ar felc'h hag ar gwerblennoù; darvezout a ra ar marv d'an oad a 5–10 vloaz.

cystinurie ◇ **cystinuria** ◇ **troazhkistinegezh b.** Ezvevennadur ar c'histin dre an troazh.

- cystique** ◇ **cystic** ◇ **1 c'hwezhigellel aa. 2 bestlgellennel aa., kellenneel aa.** 1 A-zave d'ar c'hwezhigell. 2 A-zave d'ar gellenn vestl.
- cystocèle** ◇ **cystocele** ◇ **c'hwezhigellogad g.** Avelenn ar c'hwezhigell, ken a-dreuz da speur ar c'hof, ken a-dreuz da speur ar gouin (sl. *colpocèle*).
- cystofibrome de l'utérus** ◇ **cystofibroma of the uterus** ◇ **kistofibrom g. ar grozh** Fibrom ar grozh, ennañ kavennoù kistek.
- cystographie** ◇ **cystography** ◇ **c'hwezhigelluniñ** Skinluniñ ar c'hwezhigell bet leuniet gant ur skindemerenn ebarzhet dre ar wazhienn pe dre ar c'han troazh.
- cystoïde** ◇ **cystoid** ◇ **kistvanek aa.** Heñvel ouzh ur c'hist.
- cysto-hystéropexie** ◇ **cystohysteropexy** ◇ **Aanlenañ c'hwezhigell-krozh, c'hwezhigellkrozhAanlenañ** Gwezh renet dre forzh kofel evit diren izad ar grozh kevret gant ur c'hommogad muiek eus ar c'hwezhigell, anezhañ dispegañ goueled ar c'hwezhigell, e grafaelañ ouzh an talbenn araok eus strizh ar grozh ha festañ ar grozh ouzh speur ar c'hof.
- cystolithomie** ◇ **cystalithotomy** ◇ **maenezvenañ ar c'hwezhigell, c'hwezhigellvaenezvenañ** Digeriñ surjaniel ar c'hwezhigell evit eztennañ grouan.
- cystométrie, cystomanométrie** ◇ **cystometry** ◇ **c'hwezhigellventañ** Ensinklañ dour pe CO₂ er c'hwezhigell ha muzuliañ an endalc'h anezhi war un dro gant ar gwaskoù keñverek da zereziou argreskus ar c'hoant troazhañ; disoc'hou an imboure'h a zastumer dre ur *c'hwezhigellventwezad* (Gl. *courbe cystométrique, cystométrigramme*).
- cystopexie** ◇ **cystopexy** ◇ **c'hwezhigellAanlenañ** Festañ speur araok ar c'hwezhigell ouzh speur ar c'hof a-us da juntad ar c'haezour.
- cystoplastie** ◇ **cystoplasty** ◇ **c'hwezhigellatelviñ** Dazluniañ surjaniel ar c'hwezhigell (sl. *colocystoplastie, entérocytoplastie*).
- cystoplégie** ◇ **cystoplegia** ◇ **c'hwezhigellseizi g.** Peluz ar c'hwezhigell.
- cystorragie** ◇ **cystorrhagia** ◇ **c'hwezhigellwadliñv g.** Gwadliñv ar c'hwezhigell.
- cystorrhaphie** ◇ **cystorrhaphy** ◇ **c'hwezhigellzlita** Krafaelañ ur gouli er c'hwezhigell.
- cystosarcome** ◇ **cystosarcoma** ◇ **kistosarkom g.** Yoc'henn gemplezh, ganedigel peurliesañ, ma kaver lies gwiaed hanweek pe guñv (karkinom, sarkom, enkondrom).
- cystoscope** ◇ **cystoscope** ◇ **kistoskop g.** Benveg a ebarzher er c'hwezhigell dre gateter kantroazhel evit ren an engweliñ anezhi.
- cystoscopie** ◇ **cystoscopy** ◇ **c'hwezhigellengweliñ** Imbourc'hiñ ar c'hwezhigell diwar-bouez ar c'hioskop.
- cystosigmoidoplastie** ◇ **cystosigmoidoplasty** ◇ **c'hwezhigellatelviñ a-sigma, sigmac'hwezhigellatelviñ** Dredañ surjaniel ur parzh eus ar c'holon sigma hag e skarvañ ouzh ar c'hwezhigell war-benn muiaat an ec'honad anezhi.
- cystostomie** ◇ **cystostomy** ◇ **c'hwezhigelladforzhañ** Skarvañ surjaniel ar c'hwezhigell ouzh speur ar c'hof.
- cytaphérèse** ◇ **cytapheresis** ◇ **kelligedranñ** Dispartiañ hag eztennañ kelligoù eus ar gwad (hemati, leukokit, pladanoù) : ezwanet e vez ar gwad eus gwazhienn ar gouzviad, kaset d'un ijinenn, an *edranter kelligoù* (Gl. *séparateur de cellules*) a zo e ar-c'hwel azdere'hel ar c'helligoù diuzet, ha daskoret dre ur wazhienn all; arveret e vez ar c'helligedranñ da skouer evit dastum bon-gelligoù; ur c'halvezder nes eo ar *plasmaedranñ* e amkan daskoriñ ar c'helligoù hag azdere'hel ar plasma (sl. *érythraphérèse, hémaphérèse, leucaphérèse, plasmaphérèse*).
- cyto(-)architectonie** ◇ **cytoarchitectonics** ◇ **kelligadeiladezh b.** Trevnadur ar c'helligoù e-barzh ar bluskenn empenn, hag int stalet e rezh c'hwec'h gwiskad (sl. *cortex cérébral*).
- cytochrome** ◇ **cytochrome** ◇ **kitokrom g.** Livegenn broteek houarnin ganti ur roll enzim diazez en analañ kelligel evel sammer elektron.
- cytocinèse, cytokinèse** ◇ **cytokinesis** ◇ **kitokinez g.** Heuliad an daskemmoù o c'hoarvezout er c'hitoplasm e-doug pazennoù ar mitoz pe ar meioz (sl. *caryocinèse, cinèse, cinétique cellulaire, cycle cellulaire, méiose, mitose*).
- cytocolposcopie** ◇ **cytocolposcopy** ◇ **kelligwezañ gouzoug ar grozh, gouzougkelligwezañ** Studi korrselladel ul lifrad diwar gouzoug ar grozh graet da geñver ur gouinengweliñ, war-benn dinoiñ kelligoù kankrek.
- cytodiagnostic** ◇ **cytodiagnosis** ◇ **kelligdeznaou g.** Hentenn deznouiñ soliet war studi korrselladel ar c'helligoù dastumet diwar gwiaoù pe liñvennoù ar bevedeg.
- cytofluoromètre** ◇ **cytofluorometer** ◇ **kitofluorometr g.** Ijinenn oc'h elfennañ an arhentoù kendreluc'h ec'hodet dindan ur skin laser gant ul lanvad kelligoù (miliadoù anezho dre eilenn) hag o reiñ kel eus feuriou an RNA, an DNA, an antigenoù agennenn, h.a. bezant enno; kalvezder arveret en imboure'hioù Kankrouiezh, Hiloniezh, Bevoniezh kelligel hag en Hangaoniezh dreist holl.
- cytofluorométrie, cytométrie de flux** ◇ **cytofluorometry, flow cytometry** ◇ **kelligeriñvañ g. kendreluc'hel, kelligeriñvañ lanvadel** Hentenn imboure'hiñ dre ar c'hitofluorometr (sl. *cytofluoromètre*).
- cytogénétique** ◇ **cytogenetics** ◇ **Kellighiloniezh b.** Skourr eus an Hiloniezh o studiañ ar c'heñverioù etre treuzkaserezh an doareennoù hêrezhel hag arveziou ar c'helligoù gwezher an hêrezhel (sl. *caryotype*).

cytokine ◇ **cytokine** ◇ **kitokin** g. Hanterad glikoproteek, araez kehentiñ etrekelligel; e kemm ouzh an hormonou dedaolet gant kelligoù ar gwagrennoù enbore'hañ hag o wezhiañ abell, e vez ar *c'hitokinoù* dedaolet gant kelligoù digevret (al *limfokinoù* gant al limfokit, ar *monokinoù* gant ar monokit hag ar makrofag) hag o kaout ur gwered lec'hel a rizh *korenborc'hat* pe *kefinvorc'hat*; rummoù anezho a gemer perzh en *danienn* hag en *hangae*, rummoù all zo *parennoù kreskiñ gwadparadel* (Gl. *facteurs de croissance hématopoiétique*); a du 'rall, kitokinoù zo dindan arnod evit mezegañ ar c'hankr, ar poreadoù, ar c'hleñvedoù unanhangaeel hag an haza (sl. *autocrinie, paracrinie*).

cytologie ◇ **cytology** ◇ **Kelligouriezh** b. Studi ar gellig vev en he neuziadur, he beved, he emdro.

cytolys ◇ **cytolysis** ◇ **kelligloezañ, kelligloez** g. Distruij ar c'helligoù.

cytomégalovirus ◇ **cytomegalovirus** ◇ **kitomegalovirus** g. Viruz eus kerentiad an *Herpeviridae*, gwezher poreadoù ganedigel (kleñved an ebarzhenoù kitomegalek); hag eñ kiriek ivez da rouestlodoù 'zo eus an hangaeastalañ hag eus treuzplantadurioù al lounezh; treuzkaset e vez dre an halv, an troazh, al leukokit (treuzskuilhadurioù).

cytométrie ◇ **cytometry** ◇ **kelligeriñvañ** Dewerzhañ niver ha naousterioù ar c'helligoù (sl. *cytofluorométrie*).

cytopathie ◇ **cytopathy** ◇ **kelligad** b., **kellignaoed** g. Kleñved ar gellig.

cytopathogène ◇ **cytopathogenic** ◇ **kelligkleñvedus** aa. O tec'han ur stad kleñvedel er gellig.

cytopathologie ◇ **cytopathology** ◇ **Kleñvedouriezh** b. ar **gellig, Kelligkleñvedouriezh** b. Studi kleñvedoù ar gellig.

cytopénie ◇ **cytopenia** ◇ **olkellig** g. Isniver kelligoù.

cytosquelette ◇ **cytoskeleton** ◇ **kelligatel** g. Trevnad an edañvoù stael e bodelloù pe e rouedadoù a ya d'ober kebradur ar gellig, amplegat d'ar stumm, d'ar vezellusted ha d'ar fiñvusted anezhi; unan eus kleñvedoù ar c'helligatel eo *azoniad ar blevanoù difiñv* (sl. *cls : syndrome des ~ immobiles*).

cytostatique ◇ **cytostatic** ◇ **1 kelligharz** aa. **2 kelligharzer** g. **-ioù** 1 Oc'h astaliñ neridigezh ar c'helligoù. 2 Danvezenn gelligharz.

cytotaque ◇ **cytotactic** ◇ **1 kimidrevnek** aa. **kimidrevnel** aa. 1 Gant ar c'himidrevn. 2 A-zave d'ar c'himidrevn (sl. *chimiotactisme*).

cytotaxie ◇ **cytotaxis** ◇ **kimidrevn** g., **kimidrevnegezh** b. Perzh gant kelligoù heloc'h 'zo (leukokit) da vezañ dedennet pe argaset gant ur vammenn fraouaat (sl. *chimiotactisme*).

NOTENN : Nemedennek eo gerluniadur Gl. *cytotaxie* : er c'henstrolladoù all diwar *-taxie* e verk ar rakrann ar fraouaer : gant *héliotaxie* da skouer ez eo an heol ar vammenn fraouaat; e *cytotaxie* avat e verk *cyto-* ar fraouaed, ar gellig eo a c'houzañ ar fraouaat. Ne welomp ket abeg da amprestañ hevelep luniadur nemedennek. Diouzh ret e rafemp gant *kimidrevn ar gellig* en degouezhioù dibaot ma rankfed kevenebañ ar gellig hag un elfenn all.

cytotaxigène ◇ **1 cytotauxigenic** **2 cytotauxigen** ◇ **1 kimidrevneiat** aa. **2 kimidrevneiad** g. **-où** 1 O tec'han ar c'himidrevn. 2 Seurtad hangaegemplezh spesadel (un IgM an antikorf enni) o vliavaat ar glokaenn ha houmañ d'he zro o wezhusaat kimidrevnegezh ar granulokit.

cytotoxicité ◇ **cytotoxicity** ◇ **1 kelligpistriañ** **2 kelligpistriusted** b. 1 Distruijañ kelligoù, gwezhiat gant un hangaegemplezh (antikorf-klokaenn) pe, hep amoug ar glokaenn, gant kelligoù keuzier (limfokit K, makrofag). 2 Perzh piaouet gant un hangaegemplezh pe ur gellig da zistrujañ kelligoù (sl. *cellules K, cellules tueuses naturelles, complément*).

cytotoxique ◇ **cytotoxic** ◇ **kelligpistrius** aa. En araez da geuziañ kelligoù.

cytotrope ◇ **cytotropic** ◇ **1 kelligkerc'h** aa. **2 kelligvevat** aa. 1 Tuet da dizhout ar c'helligoù, sk. : *ur garvev kelligkerc'h*. 2 A-zivout ar viruzoù, na c'hellont bevañ ha neriñ nemet ebarzh ar c'helligoù bev.

cytotropisme ◇ **cytotropism** ◇ **1 kelligkerc'hañ** **2 kelligvevadezh** b. 1 A-zivout ur garvev, bezañ kelligkerc'h. 2 Bezañ kelligvevat.

cyto-
 • *caractère cytologique* neuz kelligel • *chorion cytogène* tonenn gelligparus • *colpocytologie* kelligouriezh ar gouin, gouingelligouriezh • *cyto-architectonie* kelligadeiladezh • *cytolysé hépatique* kelligloez avu • • *cytoplasme* kitoplasm • *intracytoplasmique* enkitoplasmel • *la cytologie d'un processus néoplasique* luniadezh kelligoù un argerzh hanweel • *une préparation cytologique* un darbaradenn gelligouriezh • *une recherche cytologique* un imbourc'h kelligouriezh.

Czermak : manœuvre de ~, épreuve de ~ ◇ **Czermak's vagus pressure** ◇ **kefleñvad** g. **Czermak, proud** g. **Czermak** Pouezañ gant ar biz war ar garotidenn e par al lagadenn vigorn, dre se fraouaat an nervenn dispis : ent vonan e c'hoarvez un istead kalon.

D

dacryadénite, dacryoadénite ◇ **dacryadenitis** ◇ **daerwagrennfo** g. Tanijenn wagrenn an daerou.

dacryocystectomie ◇ **dacryocystectomy** ◇ **daersac'hezvenañ** Dilemel surjaniel sac'h an daerou, prederiadur an daersac'hfo.

dacryocystite ◇ **dacryocystitis** ◇ **daersac'hfo** g. Tanijenn sac'h an daerou.

dacryocystorhinostomie ◇ **dacryocystorhinostomy** ◇ **daersac'hadforzhañ er fri** Oberata evit parraat ouzh steviadur ar san a-fri, anezhañ ober difourkañ sac'h an daerou en ode grenn ar fri a-dreuz d'an dilhenn daerou-fri.

dacryogène, lacrymogène ◇ **dacryogenic, lacrimatory** ◇ **daereiat** aa., **daeraouiñ, daeraouus** aa. O tec'han borc'hadur an daerou.

dacryolithe ◇ **dacryolith** ◇ **daervaen** g. (l. : **daervein**) Grouanenn furmet e-barzh sanioù an daerou.

dacryon ◇ **dacryon** ◇ **dakrion** g. Poent loet war gostez gwrizienn ar fri ma kej ar mellezioù etre an askorn tal, askorn an daerou ha baleg a-dal ar garvan.

dactylogramme, empreinte digitale ◇ **dactylogram** ◇ **1 louc'had** g. **bizied, bizlouc'had** g. **2 louc'hwezad** g. **ar bizied, bizlouc'hwezad** g. 1 Merkoù lezet gant ar bizied war an traoù. 2 Lerc'hwezad eus ar bizlouc'hadoù.

dactylophasie ◇ **dactylophasia** ◇ **bizluzañ** Eztaoliñ diwar-bouez fiñvadoù ha delvadoù ar bizied, araezad eus lavar ar vouzarmuded (*yezhañ veidel*, Gl. *langue des signes*).

dactyloscopie ◇ **dactyloscopy** ◇ **louc'hwezhañ bizied, bizlouc'hwezhañ** Lerc'hwezhañ ha studiañ ar merkoù lezet gant ar bizied.

Dakin : **liqueur de ~, soluté de ~** ◇ **Dakin's fluid, Dakin's solution** ◇ **dileizhad g. Dakin** Liñvenn dilestus, dileizhenn skurzet dour javell, hipoklorit natriom ha permanganat kaliom.

Dalibour : **eau de ~** ◇ **Dalibour's water** ◇ **dour** g. **Dalibour** Dourzilezhenn arveret da brederiañ kroc'henadoù 'zo evel an impetigo, he delun : sulfat zink 70 g, sulfat kouevr 20 g, kanfr 10 g, safron 4 g, dour 1 000 g.

dalton ◇ **dalton** ◇ **dalton** g. **-où** Unanenn dolz (arouez Da) arveret evit an atom par da 1 u (unanenn tolz atom), eleze $1,6605402 \cdot 10^{-27}$ kg; evit ar molekul e reer kentoc'h gant ar kDa.

daltonien ◇ **daltonist, daltonian** ◇ **1 daltonek** aa. **2 daltoneg** g. **-eion 3 daltonek** 1 Gant an daltonegezh. 2 Gouziviad an daltonegezh. 3 A-zave d'an daltonegezh.

daltonisme ◇ **daltonism** ◇ **daltonegezh** b. Anvad rumm evit an ezreolderioù ganedigel e merzhidigezh al livioù : livan-gwel, livviwel, gwerangwel, ruzangwel, h.a., gwariadennoù hêrezhel, enkilek ha revereet (sl. *achromatopsie, achloroblesie, dyschromatopsie*).

danse des hiles ◇ **hilar dance** ◇ **dañs** g. **ar begelioù** Poulzusted reñverek hag ec'honusted barroù talmerenn ar skevent e par ar begelioù, stadet pa skinseller gouziviaded ar c'halonnaouedoù ganedigel ganto gwaduskas en o amred bihan da heul ur skoev kleiz-dehou etre-kentezoù.

Darier : **maladie de ~** ◇ **Darier's disease** ◇ **kleñved Darier** Kroc'henad hêrezhel, treuzkaset er mod trec'hek, naouus dre un dispuilhad krugennoù trouskennek kornvanek gell pe arlouet, o sezañ war an dremm, ar gouzoug hag ar bruski; dispuilhad o padout pell amzer; pa steuz, e lez war e lerc'h brizhennoù livegat.

davier ◇ **dental forceps** ◇ **gevel** b. **-ioù dent, digewaner** g. **-ioù** Gevel greñv dezhi loc'henoù hir ha krabanoù berr kenan a arverer en Dentouriezh hag e surjianerezh an eskern.

déambulation ◇ **deambulation** ◇ **baleata** Kerzhout hep pal.

1 débile 2 3 débile mental, débile ◇ **1 weak 2 feeble-minded, mental defective** ◇ **1 izil** aa. **2 laban** aa. **3 laban** g. **-ed** 1 Hep nerzh, a-zivout ur bevedeg, un organ, un arc'hwel korf. 2 Dilerc'hek kefredel. 3 Dilerc'heg kefredel.

1 débilité 2 débilité mentale, débilité ◇ **1 debility 2 feeble-mindedness, mental deficiency** ◇ **1 izilded** b. **2 labanded** b. 1 Diouer nerzh ur bevedeg, un organ, un arc'hwel korf, sk. : *izilded c'hanedigel* (Gl. *débilité congénitale*), *izilded*

c'henezhel (Gl. *débilité constitutionnelle*), *izilded loc'hadel* (Gl. *débilité motrice*). 2 Derez skañvañ a 'n dilerc'hegezh kefredel, ar gouziadiad aet oadour o piaouañ meiz ur bugel 9 pe 10 vloaz (sl. *âge mental, arriération intellectuelle, idiotie, imbécillité, quotient intellectuel*).

débit cardiaque ◇ **cardiac output** ◇ **ec'hongas g. ar galon** Kementad gwad erlusket gant pep kofig eus ar galon e-doug ur munud (arouez Q°), e-tro 5,5 l ent reol; muzuliet e vez dre bennaenn Fick pe diwar-bouez dizolc'hiñ ur merker dre liv pe dre wrez (sl. *Fick : principe de ~, index cardiaque, thermodilution*).

débit systolique, volume systolique ◇ **systolic output** ◇ **ec'hongas sistolel** Kementad gwad erlusket dre bep argrezad eus ur c'hofig kalon; da geñver pep sistol e tifiistr pep kofig etre 70 hag 80 mL gwad.

1 débitmètre, fluxmètre 2 fluxmètre, vélocimètre ◇ **1 flowmeter 2 velocimeter** ◇ **1 kasventer g. -ioù 2 diverventer g., hervventer g.** 1 Ardivink da vuzuliañ kas un heverenn en ur san. 2 Ardivink da vuzuliañ herr diver un heverenn.

débitmètre de pointe ◇ **peak flowmeter** ◇ **renngasventer g.** Ardivink da vuzuliañ herr uc'hek an aer ec'hanalet, arveret e prederiadur an astma hag ar skorted analañ.

débit

- à débit et pression physiologiques diouzh ur c'has hag ur gwask bonan
- augmentation du débit cardiaque muiadur kas ar galon
- débit d'élimination tolzkas ezvevennañ
- débit de l'élocution tead an distilh
- débit coronaire kas kurunerel
- débit en masse, débit en volume tolzkas, ec'hongas
- débit pulmonaire kas an dalmerenn skevent
- débit urinaire d'une substance tolzkas troazhañ un danvezenn.

debout

- station debout loadur war sav.

débridement ◇ **debridement** ◇ **1 didagellañ 2 distivañ** 1 Lemel surjanel tagelladur un organ dre skejañ an nask pe ar walenn dag en amwask, sk. : *didagellañ un avelenn*. 2 Flañchañ ledan un annon linek war-benn digeriñ ar c'heviouigoù o skoilhañ ouzh diver al lin.

décalcification ◇ **decalcification** ◇ **dirazekaat, dirazekadur g.** Leiadur ar c'hementad kalkiom bezant er bevedeg, en tel pergen (*diveineladur an eskern*, Gl. *déminéralisation squelettique*); hervez an dro e vez hollek, lec'hiek pe strewek; en degouezhmañ diwezhañ e lakaer kemm etre an dirazekaat dre skorted an askornbarañ (askornvloedad, askornrouezad) pe dre reñver an askornloezañ (arskoedusvorc'h, kleñved Paget, mielomoù pe kankrou an eskern) (sl. *déminéralisation*).

décalvant ◇ **decalvant** ◇ **moalaus aa.** O tevoudañ kouezh ar blev.

décalvation ◇ **decalvation** ◇ **moalaat** Kouezh ar blev.

décanulation ◇ **decanulation** ◇ **digorzanañ** Lemel ur c'horzan, korzan ar brianthenbenañ da skouer.

décapsidation ◇ **decapsidation** ◇ **dikapsidañ, dikapsidadur g.** Steuz eus klorenn ur virus, eleze eus ar c'hapsid anezhañ.

décarboxylation ◇ **decarboxylation** ◇ **dekarboksilañ** Dazgwered a ra d'un drenkenn vevel koll ur molekul CO₂ da geñver dispenn an danvezennoù mezhur pa vezont koazhet gant ar bevedeg; er gellig e vez trelusket an dekarboksiladurioù gant enzimoù, an *dekarboksilazoù*, a zo ar fosfat piridoksal ar c'hoenzim anezho.

décarboxyprothrombine, prothrombine décarboxylée ◇ **decarboxyprothrombin** ◇ **dekarboksiptrombin g., protrombin g. dekarboksilet** Stad diaraoger eus enaoz ar protrombin en avu; muiaet e vez ar feur anezhañ gant karkinom kentael an avu hag e-kerz ar mezegadurioù enepkaouediñ dre an antivitaminou K.

décérébration ◇ **decerebration** ◇ **1 empennezvenañ 2 krennempennvenañ, ec'hempenned** 1 Dilemel an empenn. 2 Skejañ ar c'hrennempenn (sl. *rigidité décérébrée*).

décérébration : rigidité de ~, rigidité décérébrée, syndrome de ~, rigidité mésencéphalique ◇ **decerebrate rigidity, decerebration syndrome** ◇ **reuter g. ec'hempenned, azoniad ec'hempenned, reuter krennempennel** Dargrezad trebad war astenn ar pevar ezel hag eus ar c'higennoù ahelel, a rizh ampikernennek, bet dec'hanet ent arnodel (Sherrington) dre skejañ ar c'hrennempenn, stadet ent klinikel, kevret gant kaouadoù ustant tetanoïdel komaek, e tro yoc'hennoù ar pont pe an ilpenn, a-wechoù e ser azoniad Little, ar c'horea, an atetoz, an empennfo, ar boukadur empenn.

décharge épileptique ◇ **epileptic discharge** ◇ **diskarg b. droukfell** Blivad trumm, diaser ha kreñv un niver bras neuron a 'n empenn oc'h erzerc'hañ ent klinikel dre varradoù droukfell.

déchoquer ◇ **to cure a shock** ◇ **divleuzañ** Prederiañ ur bleuz.

décidual ◇ **decidual** ◇ **kollgennel aa.** A-zave d'ar c'hollgenn (sl. *caduque*).

décidu-

- cellules déciduales kelligoù ar c'hollgenn, kelligoù kollgennel
- déciduome dekiuom
- déciduose dekiuoz
- la décidualisation est la métaplasie déciduale du chorion cytogène de l'endomètre ar c'hollgennekaot zo amwe kollgennel tonenn gelligparus an enkrozhen
- réaction déciduale erwezhañ kollgennaus, kollgennaat.

déclamper ◇ **to declamp** ◇ **diglampañ** Lemel ur c'hlamp.

Déclaration d'Helsinki ◇ **Declaration of Helsinki** ◇ **Diskleriadur Helsinki** Ergemenn embannet e 1964 gant an Uniad Mezegel Bed, amkanet da wehentañ ar vezeion en o emzalc'h e-keñver an armodiñ war an den e-kerz an imbourc'h bevoniel ha mezegel.

déclaration obligatoire : maladies à ~ ◇ ◇ **kleñvedoù endalc'hek o diskleriañ** E Frañs, keloù roet gant ur mezeg da Renerezh Departamantel an Oberiezh Yec'hedel ha Kedvuhez (Gl. *Direction Départementale de l'Action Sanitaire et Sociale, DDASS*) pe da Wazva ar Yec'hedouriezh (Gl. *Bureau d'Hygiène*) evit ditouriñ ar stadadenn en deus graet war ur c'hlañvour eus ur pore enskrivet war ur roll kefridiel savelet dre zeved : *avuflo lemm A, brukelloz, bosenn, botulegezh, chikungunya, deng, difteriezh, gousell kleñved Creutzfeldt-Jakob hag empennaouedoù all goulemm spouevanek dendreuzkasadus, kolera, konnar, legionelloz, listerioz, louetvelfo, ortopoksviroz hag ar vrec'h pergen, paludegezh vroat, paludegezh allvroat en departamantoù tramor; pistriboread bouedel stroll, plomegezh a 'r bugel minor, poread dre ar VIHAD e forzh pe bazenn, poread ennerus dre ar meningokok, poread lemm azoniek dre viruz an avuflo B, ruzell, serk, terzhienn velen, terzhiennoù gwadliñvus afrikat, tetanoz, tifoïd ha paratifoidoù, torzhellegezh, tularemiezh.*

Déclaration de Tokyo ◇ **Declaration of Tokyo** ◇ **Diskleriadur Tokyo** Ergemenn embannet e 1975 gant an Uniad Mezegel Bed, amkanet da wehentañ ar vezeion en o emzalc'h e-keñver ar bourevierezh hag an trennadoù digernez war an argaezhidi.

déclench-

- *contact déclenchant* keraez diaskus
- *crises de colère déclenchées par la moindre modification* kaouadoù konnar delanket gant an disterañ daskemm
- *déclencher des opérations de défense* delankañ gwezhiadennoù difenn
- *déclencher des selles nombreuses* devoudañ kac'hadennoù niverus
- *déclencher et maintenir des successions d'inspirations et d'expirations* delankañ hag arzerc'hel kenheulioù enanaladoù hag ec'h analadoù
- *déclencher une contraction ventriculaire* delankañ un argrezad kofig
- *douleur déclenchée par l'effort* laur diasket gant ar striv
- *en l'absence de tout facteur de déclenchement* e-maez a bep amveziad diaskañ
- *facteur déclenchant* parenn diaskus, delanker
- *inhiber ou déclencher la sécrétion de stimuline* degas skoilh pe lank en enborc'hañ ar stimulün
- *injection préparante et injection déclenchante* ensinkladenn eraozus hag ensinkladenn diaskus
- *la prégnance de telle ou telle gestalt dans le déclenchement des comportements* bec'hiegezh ar gestalt-mañ gestalt e delusk ar realoù
- *les types de déclenchement de la névrose* rizhoù enkleñvel an neuroz
- *mode de déclenchement des douleurs* mod deraouiñ al laur
- *situations capables de déclencher l'excitation* ar plegennoù en araez da zelankañ ar broud.

déclive ◇ **declive** ◇ **dianaou** aa. A-zave d'ar poent izelañ eus ur gouli, ur fennad, ur parzh eus ar c'horf; *dianaou* a arverer ivez evel adverb : "er poent izelañ" hag evel pennanv gourel : "poent izelañ".

décocté ◇ ◇ **anvervad** g. Disoc'h an anverv.

décoction ◇ **decoction** ◇ **1 anverv** pao. & g. **2 anvervad** g. 1 Lakaat da virviñ en dour danvezennoù mezegel evit douhenniñ ar gwezhuzennoù anezho. 2 Liñvenn o tisoc'h eus an anverv (sl. *décocté, infusion, macération*).

décollation ◇ **decollation** ◇ **gouzougenañ** Skejañ gouzoug ur grouell varv evit aesaat an eztenañ anezhi.

décollement de la rétine ◇ **retinal detachment** ◇ **diflosk g. al luc'hsae** Disfaout etre div feilhenn al luc'hsae ha naouezadur ul liñvenn isluc'hsae, o tarvezout e dianlen ur yoc'henn, un anaev a 'r gwazhied, un danijenn ha peurliesañ un daraev lec'hel pe ur rogad eus ar feilhenn diabarzh; kevaraezet e vez ar rogad gant anafoù dic'henezhadel al luc'hsae diwar an argozhañ, un isstiwel muiek pe an anferenn; erzerc'hañ a ra an diflosk dre flojennoù oc'h anadiñ er gwelvaez ha dre vuturniadur hemañ; an dedro emdarzh eo an dallentez; d'e brederiañ diwar zifrae e fester feilhennoù al luc'hsae dre ar yewezhiañ pe al luc'hgouledifñ (lasergurañ); gwezhoù surjiañel a vez ergemennet war-benn adastokaat div feilhenn al luc'hsae.

décoll-¹

- *décoller les sécrétions bronchiques* dispegañ borc'hadennoù ar bronkez.

décoll-²

- *prothèse dentaire décollée* dentosod oufennek.

décolor-

- *décoloration des cheveux aboutissant à leur blanchiment* dislivañ ar blev betek ar gwenn.

décompensation ◇ **decompensation** ◇ **digevassav** pao. & g. Terriñ ar c'hempouez diraezet dre ar c'hevassav (sl. *compensation*).

décompensé ◇ **décompensated** ◇ **digevassavet** A-zivout un anaf a zinod e weredoù da heul torradur ar c'hempouez diraezet dre ar c'hevassav, sk. : *kalonnaoued digevassavet*.

décomplémentation ◇ **decomplementization** ◇ **diglokaennañ** Steuz he gwezusted gant klokaenn ar gwadvez dindan an tommañ da 56°C e-doug un hanter eurvezh.

décomplémenté ◇ **decomplementized** ◇ **diglokaennet** A-zivout ar gwadvez bet diwezhusaet e glokaenn.

décomposition

- *décomposition des matières organiques* ec'haoz an danvezioù bevel
- *hypertémie, dysmétrie, décomposition du mouvement* uc'haen, mïaen, diskemal a 'r fiñvoù.

décompression

- *décompression, dépressurisation* leiaat an amwask, ec'hamwask, lammwask.

déconditionné ◇ **deconditioned** ◇ **dizarbleget** A-zivout ur gouzrec'h bet steuziet gantañ un damoug darblegadel.

déconnexion neurovégétative ◇ **neurovegetative disconnection** ◇ **digennaskañ nervstruzhel** Lemel an erwezhoù nervstruzhel er bevedeg diwar-bouez liaoù o peluzañ ar c'hreizennoù empenn, ar sinapsoù kangren ha buzeroù ar nervreizhiad struzhel, kalvezder arveret en hunegañ danzeadel.

déconnexion

- *déconnexion interhémisphérique* digennaskañ etre-hanterennoù.

décontract-

- *décontraction* diargrezañ • *décontracturant central* dizargrezus a-greiz.

décortication ◇ **decortication** ◇ **1 distoagennañ 2 diskaenañ 3 pluskennezvenañ 4 ezpluskennded b.** 1 Distagañ surjaniel un organ diouzh e c'holoenn stirek bonan pe gleñvedel, sk. : *distoagennañ ar galon* (Gl. *décortication du cœur*, sl. *pé-ricardecctomie*), *distoagennañ ar skevent* (Gl. *décortication pleuropulmonaire*, sl. *pleurectomie*). 2 Dilemel haenadoù gorre un organ. 3 Dazbidañ pluskenn an empenn (sl. *correctomie*). 4 Stad disoc'h ar pluskennezvenañ.

décortication : rigidité de ~, syndrome de décortication ◇ **decorticate rigidity, cerebral decortication syndrome** ◇ **reuter g. ezpluskennded, azoniad ezpluskennded** Reuter heñvel ouzh ar reuter ec'hempenned, diforc'h dioutañ dre blegadur an divarvec'h hag an daouarzorn ha nesadur an divvec'h; devoudet e vez ent arnodel dre ar pluskennezvenañ, stadet er c'hlinik e tro empennfoioù 'zo ha daraezioù empenn grevus (sl. *décérébration : rigidité de ~*).

décours ◇ **decrement** ◇ **souzadur g., souzvezh g.** E dedro ur c'hleñved, prantad ma vez an azonou o tigeskiñ, an daou brantad all o vezañ ar *raogadur* (*raokvezh*), prantad ma vez an azonou o kreskiñ, hag ar *vog* (*bogvezh*), prantad ma vezont en o c'hreñvañ (sl. *acmé*).

décément ◇ **decrement** ◇ **azleiad g.** Kementad digreskiñ ur braster pe un argemmenn (sl. *incrément*).

décubitus ◇ **decubitus** ◇ **gourvez g.** Loadur ar c'horf astennet war ur gorre a-zremm; hervez an emlakadur e tiforc'her ar *gourvez a-gein* pe *drekourvez* (Gl. *décubitus dorsal*), ar *gourvez a-gof* pe *rakourvez* (Gl. *décubitus ventral, procubitus*), ar *gourvez a-gostez* (Gl. *décubitus latéral*).

décussation ◇ **decussation** ◇ **kroazigell b.** Kroaziañ e rezh un X, termen arveret da zeskrivañ treug ar gwiennou nerval o vont eus furmadurioù (troadoù a 'n empenn, pont, hirvel, mel) an eil tu hag o kroaziañ e par an dalenn greizer gant ar gwiennou kevelp o tont eus an tu all (sl. *commissure*).

dedans

- *mince anneau de substance grise situé en dedans de la circonvolution limbique* gwalenn voan a steuñvenn louet loet a-ziabarzh da droenn ar senklenn • *oblique en dedans* a-veskell war ziabarzh • *porter la plante en dedans* kas ar sol war ziabarzh.

dédifférenciation ◇ **dedifferentiation** ◇ **diziforc'hekaat** Daskeñmañ furm hag arc'hwel o c'hoarvezout gant ar c'helligoù tiñvet war metier naturel pe galvezadel, anezhañ an distreiñ d'o stad rihellel dre goll pep diforc'hekadur.

dédoublement de la personnalité ◇ **double personality, split personality, personality dual** ◇ **dizoubladur g. ar berson-elezh, daouve g.** Kenvezañs gant ur gouzrec'h eus daou rizh realezh, an eil renet diarvonn, dassellek hag azas ouzh an amved, egile diarzoug, andassell ha diazas, dindan luskedoù diemouez.

défaillance ◇ **1 failure 2 fainting** ◇ **1 falladur g. 2 fatañ, fatadur g.** 1 Termen arveret evel heñvelster da *skorted* (Gl. *insuffisance*), sk. : *falladur kalon*. 2 Termen arveret a-wechoù da verkañ derez kentañ an *ezwal* (Gl. *syncope*).

défaillance multiviscérale : syndrome de ~, syndrome septique ◇ **multiple organ failure syndrome** ◇ **azoniad falladur lies organ, azoniad lestel** Azoniad grevus o tarvezout da heul un ankalez analadel, anezhañ skorted lemm lies organ ha reizhiad (avu, lounezhi, reizhiadoù kalongwazhiedel, koazhadel, nerval), kresk ar c'has kalon, uskennevid o tec'han un eznevid muiek; azoniad stadet ivez er bleuozou (lestel, liesdaraezel, bleu an devidi) o tedreiñ peurliesañ d'ar marv dindan daou viz; er wikefre anezhañ e tasperzhfe hanteradoù diseurt (interleukineier, kakektin).

défaut

- *défaut d'un système optique* si en ur reizhiad optikel • *défaut de développement* andiorreadur • *défaut de la lumière d'un organe* diouer oaled un organ • *défaut de relâchement* skorted laoskaat • *défauts de texture ou de contours* sioù ar wiadezh pe an trolinennoù • *par défaut* ampleg, a-rakwez, anspizet • *zéro défaut* ansi.

défecation ◇ **defecation** ◇ **1 kac'hout, oulgarzhañ 2 diouelezenañ** 1 Ezvountañ an oulennoù dre ar fraezh. 2 Ezvevennañ ar gouelezennoù eus ul liñvenn ha dislivañ houmañ dre al ludu eskern pe an isaketat plom.

défécographie ◇ **defecography, evacuation proctography** ◇ **kac'hluñiñ, fraezhluñiñ oulgarzhadel** Skinluñiñ dialuskel arveret da imbourc'hiñ an andalc'h eus ar fraezh.

défémisation ◇ **defemination** ◇ **divenevelaat** Steuz a 'n arouezioù revel gant ar vaouez kaezourek.

défense musculaire ◇ **muscular defence** ◇ **emzifenn g. kigenne** Argrezadur dibad ha laurus eus kigennoù speur ar c'hoef devoudet gant an teuta, oc'h erzerc'haat un tizhad lec'hiek eus an ampeleñ.

déférent, canal déférent ◇ **ductus deferens** ◇ **san b. sper** Parzh eus ar forzhioù sper gavalet etre an argell hag ar gellenn sper.

déférentite ◇ **deferentitis** ◇ **spersanfo g.** Tanijenn ar sanioù sper.

déferentographie ◇ **deferentography** ◇ **spersanluniñ** Skinluniñ ar san sper goude ensinklañ enni un danvezenn skindemer.
déferescence ◇ **deferescence** ◇ **diwresteriñ** Diskenn argammedek an derzhienn betek an distro d'ar gwrezverk bonan.

déibrillateur, cardiovertteur ◇ **defibrillator, cardiovertor** ◇ **digrehader** g. -ioù, **kalonassaver** g. -ioù, **kardiovertter** g. -ioù Ardivink arveret da herzel ouzh ar gwiengrehad diwar-bouez un *tredansak*, dre lakaat an elektrodoù a-stok ouzh speur ar brusk er prederiadur mezegel, ouzh ar galon er surjianerezh; *digrehaderioù damemgefreek* a vez lakaet e kerz ar c'hevredig el lec'hioù foran, en nijerezh; evit an *digrehaderioù enstedadus* a vez gougorzhet war eun gant direizhoù ar gorvez kalon (sl. *atriovertteur, cardioversion, choc électrique, fibrillation, stimulateur cardiaque*).

déibrillation ◇ **defibrillation** ◇ **digrehadiñ** Herzel ouzh ar gwiengrehad kalon dre ziounit un *tredansak*; liaoù 'zo evel ar *c'hinidin* a arverer ivez da ziren gwiengrehad ar c'hentez.

déibrination ◇ **defibrination** ◇ **olfibrin** g. Steuz eus fibrin ar gwad, hemañ o vont ankaouledus; e zevoudañ a reer *in vitro* dre vasañ; ent klinikel e tarvez dre zistruj (fibrinloezañ, proteinloezañ) pe dre reñver beveziañ (sl. *coagulation intravasculaire disséminée*).

défic-

• *déficience absolue ou relative dans l'organisme d'une ou de plusieurs substances* ezvezañs pe skorted er bevedeg eus un pe lies danvezenn • *déficience fonctionnelle du col utérin* skorted arc'hwelel gouzoug ar grozh • *déficit congénital et définitif en glukuronyl transférase* divigad ganedigal ha diwezhelel glukuronil transferaz • *déficit de l'immunité* divigad an hangae • *déficit de la marche* andrafted • *déficit de la sécrétion gastrique* skorted eus borc'hañ ar stomok • *déficit moteur* divigad loc'hadel • *dû à un déficit en arginase* diwar un divigad arginaz • *immunodéficience* divig an hangae, hangaezivig • *syndrome immunodéficitaire* azoniad an hangaezivig.

déflexion ◇ **1 extension 2 deflection** ◇ **1 diblegañ 2 gougammañ** 1 E-kerz ar gwilioud, en erloadoù an dremm hag ar gitem, astenn war dreñv penn ar grouell (sl. *présentation de la face*). 2 Gwariañ ar c'halonvarwezad a-us pe a-is d'al linenn geitredan.

défloration ◇ **defloration** ◇ **diflourañ** Fregañ al lienenn gourzh da geñver ar geventrac'h kentañ.

déformation ◇ **deformation** ◇ **1 disneuziañ, disneuziad b. 2 distummadur** g. 1 Distresadur korfadurel c'hoarvezet goude ar c'handedigezh (sl. *malformation*). 2 Er Bredelfennerezh, disoc'h eus c'hwel an hunvre : daskemmet e vez an devezoù enketel ken ez anadont dishevelebet e-barzh an endalc'hed diskelat.

dégagement ◇ **disengagement** ◇ **1 ec'hankañ 2 ezwezhañ** 1 Lankad diwezhañ ar gwilioud, heuliad dilec'hiadoù emdarzh pe ameillet ar grouell en he zremen dre zigor traoñ al lestr ha dre ar c'hourzh. 2 Lankad dibenn ar gur elfennadel, pa zeu ar gouzrec'h a-benn da emouezañ ouzh natur gleñvedel e zifennadennoù.

dégénérescence, dégénération ◇ **degeneration** ◇ **dic'henezhañ, dic'henezhadur** g. Disleberadur hollel pe darnel ur bevedeg; en Neuzkleñvedouriezh, daskemm ur gwiaed pe un organ treuzfurmet o c'helligoù en un danvezenn anniñv kollet ganti nep perzh arc'hwelel.

dégénérescence graisseuse ◇ **fatty degeneration** ◇ **dic'henezhañ behinek** Bezañs greunennadoù behinek e-barzh ur gellig darallet he c'hraoñell hag he frotoplasm.

dégénérescence hépatolenticulaire, syndrome hépatostrié ◇ **hepatolenticular degeneration** ◇ **dic'henezhadur avuferegel, azoniad avurizennegel** Naoued hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkliek, oc'h anadiñ gant ar grennarded hag an oadourion yaouank, naouus 1) *ent klinikel*, dre 1a) erzerc'hadoù empenn : dic'henezhadur eus ar c'horfoù rizennek (*kleñved Wilson*) pe eus gronnoù an diaz (*gaouskleroz strewek Westphal-Strümpell*) 1b) un tizhad avu, o tedreiñ trema ar c'hirrozh, 1c) strafuilhoù livegennel, *trogornsaeenn Kayser-Fleischer* da gentañ penn, 1d) strafuilhoù anarstal a 'r bred, a 'r gwad, a 'n eskern, a 'n enborc'hañ, a 'r glukozarouleviañ, 2) *ent amglinikel*, dre droazhusvorc'h an amindrenkennoù ha migennevid ar c'houevr, hemañ o vezañ ezvezet er vestl, azdalc'het er gwiadoù hag ezvorc'het afont gant al lounezhi.

dégénérescence : réaction de ~, réaction de ralentissement ◇ **reaction of degeneration** ◇ **erwez g. dic'henezhadur, erwez gorrekaat** Teskad an anadennoù oc'h erzerc'haat astal an nervretisted e par an neuron loc'hañ trobarzhel : anvroudadusted an nervenn ouzh ar redoù galvaniek ha faradek, anvroudadusted ar c'hahe ouzh ar red faradek, erwez gorrek ar c'hahe ouzh ar broudañ galvaniek.

dégénér-

• *affection dégénérative du cervelet* naoued dic'henezhadel an ilpenn • *arthropathie dégénérative* arzad dic'henezhadel • *dégénérescence ballonisante* dic'henezhadur gloevennus • *dégénérescence choroidienne* dic'henezhadur an dolgennsae • *dégénérescence tapétorétinienne* dic'henezhadur tabezennluc'hsael • *lésion dégénérative* anaf dic'henezhadel • *mode de dégénérescence* mod dic'henezhañ • *processus dégénératif* argerzh dic'henezhañ.

déglutition ◇ **swallowing** ◇ **lonkañ, lonkadur** g. Ober da endalc'had ar genoù tremen dre ar c'hargadenn hag an treizher.

dégradation

• *catalyser la dégradation d'amidon en maltose* treluskañ dispenn an ampez e maltos • *dégradation de l'acide adénosine triphosphorique* dispenn an drenkenn adenzin trifosforek • *dégradation ou digestion des cellules* dispenn pe goazhañ ar c'helligoù • *dégradation physiologique progressive du glycogène en glucose* bevec'haozañ argammedek ar glikogen e glukoz • *dégradation totale ou partielle d'un organisme* disleberadur hollel pe darnel ur bevedeg • *produit de la dégradation incomplète* des

acides aminés aromatiques kediad diwar ec'haozañ diglok an amindrenkennoù aromatek • *produits de dégradation* ec'haozadoù • *produits de dégradation du fibrinogène* danvezzennoù diwar zispenn ar fibrinogen • *réactions de dégradation* dazgweredoù ec'haozañ • *substance susceptible d'être dégradée* danvezenn a c'hell bezañ dispennet • *substances provenant de la dégradation des albumines et des graisses* danvezzennoù o tont diwar ec'haozadur an albumineier hag an druzennoù • *voie de dégradation du glucose-6-phosphate* treug ec'haozañ ar glukoz-6-fosfat.

dégranulation ◇ **degranulation** ◇ **dic'hreunennañ**, **dic'hreunennadur** g. Steuziañ ar greunennadoù bezant e protoplasm kelligoù 'zo (granulokit, mastokit, h.a.), da skouer pa skuilh ar greunennadoù-se o endalc'had e-barzh ar vakuol enkelligel (pe fagokitom) ma vo gwezhiet ar fagokitoz.

dégranulation des basophiles ◇ **basophil degranulation** ◇ **dic'hreunennañ ar bazofil** Dilaoskiñ o greunennadoù, enno histamin, gant ar granulokit bazofil pa zeuont e diastok an antigen a zo kizidikaet outañ an IgE bezant warno, erwezh en orin an darvoudoù dreistkizidigezh kentizhek.

dehors

• *chaîne de ganglions lymphatiques disposés en dehors ou en avant de la veine jugulaire interne* hedad gwerblennoù loet e-maez pe dirak ar wazhienn a-gerc'henn diabarzh • *situé entre la capsule extrême en dehors et le noyau lenticulaire en dedans* loet etre ar pourc'had eizhañ en diavaez hag ar gronn ferek en diabarzh • *transposer plus haut et plus en dehors le canthus palpébral* treuzlec'hiañ war grec'h ha war ziavaez freilh ar malvennoù.

Deiters : syndrome du noyau de ~, syndrome de Pierre Bonnier ◇ **Deiters' nucleus syndrome, Bonnier's syndrome** ◇ **azoniad ar gronn a-rakkamb kostezel, azoniad gronn Deiters, azoniad Bonnier** Teskad an direizhoù diwar dizhadur ar gronn a-rakkamb kostezel, trolern, strafuillh ar c'hempouez, gwariadur ar bizied yod war-du an anaf, eskerbad an divesker, treuzkorzhañ, strafuillhoù lagadloc'hadel ha klevedel.

déjà vu : phénomène du ~, déjà vécu : phénomène du ~ ◇ « **déjà vu** » **phenomenon**, « **déjà vécu** » **phenomenon** ◇ **anadenn ar gwelet-c'hoazh, anadenn ar buhezec-c'hoazh** Kammanglevad adkavout un den pe un dra bet gwelet c'hoazh, ur blegenn bet buhezec c'hoazh (*kammaznaoud*) (sl. *paramnésie de certitude*).

Dejerine : syndrome sensitif cortical de ~ ◇ **Dejerine's parietal lobe syndrome** ◇ **azoniad santadel pluskennel Dejerine, azoniad kiternel Dejerine** Teskad strafuillhoù an eraezñ, anezho faziou delec'hiañ, leiadur ar skarat stokadel, gwanaat skiant an emstummoù hag ar stokdenaoud hep direizh e modoù all ar santout (laur, gwrezverk, tonreizher), stadet a-eiltu pa vez anafoù an droenn drek-nen (*circonvolution pariétale ascendante*) (boukadur, daraez, yoc'henn) (sl. *pariétal : syndrome ~*).

déjection

• *maladie transmise par les déjections de Reduviidés hématophages du genre Triatoma* treuzkaset dre ziouladoù Reduviideged gwadezat eus ar genad Triatoma.

délétaire ◇ **deleterious** ◇ **argevezus** aa. Noazus bras, disleberus d'ar yec'hed, o lakaat ar vuhez en argoll.

délétion ◇ **deletion** ◇ **dileiñ** (bn. : *dilo-*), **dilead** g. -où 1 Er Vevoniezh volekulel, ezvezañs un tammad en un arrevell. 2 En Hiloniezh, gouskoevad o c'hoarvezout eus koll ur parzh kromozom, o tec'han kammneuziadoù alies, sk. : *dilead brec'h verr ar c'hromozom 4*, diwarnañ dilerc'hegezh vred ha savder-pouez, korrlopennegzh, skarlagadegezh, epikantuz, mizlidoù an dremm, kolobom, hipospadias, kehentad etre-kentezoù, barradoù glizi.

déleucocytation ◇ **leucodepletion** ◇ **disgwennañ** Araezad amkanet da eztennañ al leukokit dre silañ ar gwad erlamet evit dizarbenn an erwezhioù hangae unspesaden antiHLA gant gouziviaded dindan dreuzskuilhañ liesel.

délimit-

• *le bord libre de la tente du cervelet délimitant l'incisure tentorielle* ribl rez telt an ilpenn o tezvonnañ ask an telt ilpenn • *segment des voies aériennes délimité par les parois du pharynx* rann an aerforzhioù dezvonnet gant speurioù ar c'hargadenn.

délimit ◇ **delirious, delusional** ◇ **1 ambreek** aa. **2 ambree** aa. **3 ambree** g. -ion **4 ambree** aa. 1 Gantañ doare an ambren, sk. : *mennozioù ambreek*. 2 Oc'h ambren. 3 Gouziviad oc'h ambren. 4 A-zave d'an ambren, sk. : *gouvid ambree*.

délie ◇ **delirium, delusion** ◇ **ambren** pao. (bn. : *ambre-*), **ambren** b. -où Direizh vred naous dre goll ar galloud da gendoniañ gant an traoù ha da gehentiñ gant an dud (*dezeverezh antraek*, Gl. *pensée délirante*); ar gouzrec'h ambree ned eo ket, ac'hoel war ar poent ma ambre, evit ren kevazas an dezvarn war an traoù, war realezh an dud na war e realezh e unan; faos e vez e haeradennoù hag andireadus ar gredenn a laka enno; da heul, dre benn an distroc'h m'emañ diouzh ar gedvuhez e vez distaolet gant ar gevredigezh, rak ar skiant voutin ne c'houzañv ket na ober meiz war e lavar na war e realezh; stadet e vez an ambren e lies bredanaez; hervez luniad an ambrenoù e tiforc'her ar *mennozioù ambree liesneuz* (Gl. *idées délirantes polymorphes*), dezho meur a zodenn kenvellet mui pe vui, hag an *ambrenoù reizhiadek (délires systématisés)*, anezho trevnadoù frammet en dro d'un dodenn unel; hervez a dodenn, e teskriver an *ambrenoù heskinadur* (Gl. *délires de persécution*), an *ambrenoù a veurped pe meurvreadezh* (Gl. *délires de grandeur; mégalomanie*), an *ambrenoù melankolek* (Gl. *délires mélancoliques*), h.a.; kemm a lakaer ivez, hervez o fadelezh, etre an *ambrenoù lemm*, pe *psikozioù ambree lemm* (Gl. *psychoses délirantes aiguës*) hag an *ambrenoù henek* (Gl. *délires chroniques*) (sl. *bouffée délirante, hallucination, psychose*).

délie aigu ◇ **acute delirium** ◇ **alfo** g. **lemm** Anaev grevus kenan, dibaot, o c'hoarvezout eus *l*) un azoniad bredel : arluz don, kefroù bredloc'hadel muiek, enkre brevus, trezerc'hioù, 2) un azoniad kreudel garv : dizurzhoù nervstruzhel bras, uswrester a-serzh, poulz herrek tre, दौरisvec'h, teuz ar c'higennoù, gwadusvec'h urea; hep mezegadur ez a an dedro d'ar c'hoempad ha d'ar marv dindan un nebut devezhoù; un orin pistriboreel a c'houlakaer d'an alfo lemm.

délire alcoolique aigu, delirium tremens ◇ **delirium tremens** ◇ **alfo kren, alfo alkoolle lemm** Empennaoued lemm diwar an alkoollegezh henek, naouus dre un daolenn glinikel a bistrriadur grevus : ambren errizhek ha trezerc'hioù, terzhienn, c'hwezadur puilh, kefroù, krenerezh taer, दौरisvec'h, daralladur bras ar stad hollek hag, en degouezhioù grevusañ, hep mezegadur, dedro d'ar marv.

délire d'imagination, délire fantastique, paraphrénie ◇ **paraphrenia** ◇ **ambren dec'hmegadel, ambren imbroudellek, parafreniezh** b. Stad kleñvedel ma vez aloubet maezienn an emouezañ gant un oberiezh handerc'hañ diwar goust skiant ar werc'helezh.

délitescence ◇ **delitescence** ◇ **angizañ** Steuziañ un anadenn gleñvedel (yoc'henn, dispuilhad) hep ma c'hoarvezfe rouestlad na remortad.

délivrance ◇ **placenta birth, placenta stage** ◇ **gweleskar pao. & g.** Trede lankad ar gwilioud, ezvountañ adparzhioù ar grouell.

délivre, arrière-faix ◇ **secundines** ◇ **gweleskar g. -où** Ar pezh a chom er grozh goude ezvountañ ar grouell (torzhienn, funig, liennoù).

demande

• *stimulateur fonctionnant « à la demande » en cas de survenue d'un trouble du rythme cardiaque* tredanfraouaer oc'h arc'hwelañ diwar c'horgorzh pa c'hoarvez un strafuilh e korvez ar galon • *tube métallique préfabriqué ou réalisé à la demande* korzenn vetal ragoberiet pe aozet diwar c'houlenn.

démarche ◇ **gait** ◇ **argenk g.** Doare ma kerzher ; hervez an direizh a stader en argenk ar c'houziviaded e teskriver : *argenk a-bilpaz* (Gl. *démarche à petits pas*), azon ar seizi gaouhirvelel ; an *argenk ankedreel* (Gl. *démarche ataxique*) naouus d'an tabez ; an *argenk dasstrizhek* (Gl. *démarche spastique, démarche spasmodique*) stadet en treuzseizi dasstrizhek ; an *argenk falc'hus* (Gl. *démarche en fauchant, démarche hélicopode*), kerzhed al ledseizidi ; an *argenk gweltreek* (Gl. *démarche en ciseaux*) a gaver ivez en treuzseizi dasstrizhek ; an *argenk houad* (Gl. *démarche de canard*), naouus d'ar viopatiezh ; an *argenk ilpenndasstrizhek* (Gl. *démarche cérébellospasmotique*), gant klañvourion ar skleroz strewek ; an *argenk ilpennel* (Gl. *démarche cérébelleuse*), naouus d'un anaf ilpenn ; an *argenk mezedeck* (Gl. *démarche ébrieuse*), kerzhed ar mezvadur ; an *argenk momeder* (Gl. *démarche pendulaire*), doare kerzhout an treuzseizi gant dargrezañ muiek ; an *argenk ravanellus* (Gl. *démarche en draguant, démarche helcopode*) stadet el ledseizi gwak ; an *argenk tusus* (Gl. *démarche en steppant, steppage*), naouus d'an nervennfô alkoollel.

démence ◇ **dementia** ◇ **envedi b.** Daralladur dieiltro eus an arc'hwelioù bredel : naoudezh, kounerezh, meizerezh, dezeverezh ; ennet klasel e keveneber an envedi, a zo un argizañ, hag an dilerc'hegezh (an "dioded"), a zo un darniñ a 'n diorreadur ; e-touez an *envedioù kozhiadel* ha *rakkoziadel* e tiforc'her an *envedioù dic'henezhadel*, evel kleñved Alzheimer, hag an *envedioù gwazhiedel* pe *talmerennadel*.

démence artériopathique, démence vasculaire ◇ **multidefect dementia, vascular dementia** ◇ **envedi b. dalmerennadel, envedi wazhiedel** Envedi e dianlen ur strewad anafoù heskwadel en empenn.

démence avec corps de Lewy ◇ **dementia with Lewy's bodies** ◇ **envedi gant korfoù Lewy** Seurtad envedi dic'henezhadel o kevrediñ koll arc'hwelioù an naout, trezerc'hioù gweladel adfeilhus hag un azoniad parkinsonek.

démence frontotemporale ◇ **frontotemporal dementia** ◇ **envedi dalividigel** Stroll envedioù dic'henezhadel naouus *ent neuziadurel* dre isteñv muiek an tolbezennoù tal hag ividig hag *ent klinikel* dre ar mirealoù (strafuilhoù an noa, amlvez korfel, andeur) anatoc'h eget direizhoù an naout ; rizh envedi a denn dezhañ kleñved Pick ; stadet e vez ivez alies e-kerz ar skleroz kaheisteñvel kostezel (Gl. *sclérose latérale amyotrophique*).

déminéralisation ◇ **demineralization** ◇ **diveinelaat** Ezvevennañ reñverek dre an diouladoù eus danvezennoù meinel (fosfor, kaliom, natriom, kalkiom, h.a.) ; hiziv ne vez arveret an termen ken nemet evit ober anv eus ar c'holl gant an eskern eus o elfennoù meinel : ar fosfor hag ar c'halkiom (sl. *décalcification*).

demi-vie, période ◇ **half-life** ◇ **hanterhoali g.** Padvezh ret d'un danvezenn evit steuziañ diouzh ar bevedeg ma 'z eo bet ebarzhet ; anv a reer a *hanterhoali bevoniel* e-keñver steuz ul lia diouzh ar bevedeg, a *hanterhoali gwerc'hek* pa sammer ar skinizotop steuziet dre an digevanañ hag ar skinizotop ezvevennet gant ar bevedeg.

démographie ◇ **demography** ◇ **poblañsouriezh b.** Studi stadel stad ha kentro ar strolleñnoù tud.

démonomanie ◇ **demonomania** ◇ **demonvreadezh b.** Ambren reizhiadek da zodenn dezhi an diaoul, a sponter razañ, a haerer bezañ pozitiz gantañ (*demonopatiezh*) pe a azeuler (*demonolatriezh*).

démyélinisant ◇ **dimyelinating** ◇ **divielinaus aa.** O tistrujañ ar mielin.

démyélinisation ◇ **dimyelination** ◇ **divielinaat** Steuz ar feur vielin diwar dro akson un nervwienn, stadet e kleñvedoù 'zo evel ar skleroz strewek hag al liesgwriennfô.

dénaturation ◇ **denaturation** ◇ **dinatúrañ** Daralladur ur molekul pe un danvezenn diwar-bouez araezioù kimiek pe fizikel, sk. : *dinatúrañ an alkool* evit e lakaat anvevezadus, *dinatúrañ ar proteinoù* (sl. *renaturation*).

dendrites ◇ **dendrites** ◇ **dendrit u.** Astennadoù protoplasm o vleñchennañ en dro d'an neuronenn, forzhioù kreiztizh an nervlanv ; an hollad anezho eo an *dendron g.* (Gl. *dendrone*).

dénégation ◇ **negation** ◇ **goumezañ** Er gur vredelfennadel, araez difenn a-berzh ar gouziviad pa zianzav ur c'hoant, ur mennoz, un trivliad emañ o paouez eztaolñ, o tiskouez dre se emaint arvoustret.

dénervation ◇ **denervation** ◇ **1 dinervañ 2 eznervaouiñ** 1 Dilemel nervenn(où) un organ, ur parzh korf. 2 Koll an nervaouiñ bonan.

dengue, fièvre rouge ◇ **dengue** ◇ **deng g., terzhienn b. ruz** Arboviroz, pore darreuziat ha broereuziat e Geverdazia hag en inizi an Habask, naouus dre *a*) ur gounervezh etre 3 hag 8 devezh, *b*) un deroù trumm gant poan en arzoù hag er c'higennoù, c' hwarrennoù hollek, terzhienn o luskellañ en dro da 38°, *c*) un didorr d'ar pevare deiz ha, goude 48 h, *d*) ur remortad a 'r gwrester gant un dispuilhad ruzellvanek pe skarlegvanek o paouez trumm dindan etre 2 ha 4 devezh; trebadout a ra an asikted hag an arzostoù e-doug hir amzer goude ar pare; devoudet e vez an deng gant lies seurtad arboviruzoù trezouget gant moustiked (a 'r genad *aedes* peurliesañ); arboviruzoù 'zo eus ar genad *Alphavirus* (chikungunya, onyongnyong) a zec'han *terzhiennoù gwadliñvus* (*deng gwadliñvus*), grevus, marvus evit ar vugale (sl. *chikungunya*); e 2006 eo bet enskrivet an deng war roll ar c'hleñvedoù endalc'hek o diskleriañ.

dénivellation

- *dénivellation dans un tube capillaire non mouillable* diliveañ en ur vrigerenn angleb.

dénomination commune internationale (DCI) ◇ **International Nonproprietary Name (INN)** ◇ **deanvadur g. boutin etreizez (DBE)** Termen oc'h arouezañ un angevezh apotikel dibarek, darbennet adalek 1953 gant Aozadur Bed ar Yec'hed; an DBE ne vez ket bepred an anvad kimiek ha ne vez nepred un anvad kenwerzhel.

dénomination des médicaments ◇ ◇ **deanvadur al liaoù** Pevar deanvad a c'hell kaout ul lia : 1) an anvad kimiek, 2) an deanvad boutin etreizez, 3) an anvad kenwerzhel, eleze ar *merk* dibabet ha perc'hennet gant ur c'henderc'her, 4) an anvad genadel, kenwerzhel ivez, roet gant korvoer un eilad goude soetadur digended ar breou piaouet gant ar c'henderc'her kentañ.

densité parasitaire ◇ **parasite density** ◇ **douester g. arvevaded** Niver keitat an arvevaded dre mm³ gwad evit holl dud ur strollenn (*keitad poreadur*, Gl. *moyenne d'infection*) pe hepken evit an dougerion arvevaded er strollenn (*keitad poreadur an arvevataidi*, Gl. *moyenne d'infection des parasites*); evit studiañ ar baludegezh dreist holl e vez arveret an douester arvevaded.

densitométrie ◇ **densitometry** ◇ **douesterventerezh g.** Muzulierezh douester optikel an organoù imbourc'het dre ar skinoù X (sl. *ostéodensito-métrie*).

dentine, ivoire ◇ **dentin** ◇ **dentin g.** Gwiad arwenn oc'h amparañ an dent; goloet emañ gant an amailh e par ar gurunenn, gant an diraskorn e par ar gwrizennoù; en e gavenn emañ ar vouedenn dant.

dentinogenèse ◇ **dentinogenesis** ◇ **dentinbarañ** Furmiñ an dentin.

dentition ◇ **teething** ◇ **dentparañ** Furmiñ ha sevel an dent; ent resis, diorren an dent hegouezh (dre vras, etre ar 6t hag an 30t miz) hag an dent padus (dre vras, etre 6 hag 25 bloaz).

dents ◇ **teeth** (u. : **tooth**) ◇ **dent** (u. : **dant**) Organoù bihan kalet arwenn amkanet da vreviñ ar boued, ensteudet e logigou ar garvan hag ar c'haved, pep hini o c'hoarvezout eus ur wrizienn sanket en askorn, ur gurunenn dizolo e kavenn ar genoù hag, etre an div, ur gouzoug goloet gant ar vunsun; kemm a lakaer etre an *dent hegouezh* (Gl. *dents de lait, dents déciduales*), 20 anezho, hag an dent padus (Gl. *dents permanentes*) a stago da sevel en o lec'h adalek an oad a 7 vloaz, 32 anezho (8 rakdant, 4 ankandt, 8 rakvaler, 12 maler); *dent diwezhat, dent korn* (Gl. *dents de sagesse*) a reer eus an trede malerioù o sevel pell pe pelloc'h amzer war-lerc'h ar re all.

denture ◇ **lactation** ◇ **dentadur g.** Teskad an dent naturel d'an ampoent-mañ ampoent eus an hoali; an *dentadur hegouezh* (Gl. *denture lactéale*) a reer eus teskad an dent hegouezh.

dent-

- *dentoformateur* dantparer • *dont les mors sont armés d'une denture antidérapante et atraumatique* dent disramp hag andaraezus ouzh e javedoù • *longues mandibules finement denticulées* javedoù hir dentigaouet munut.

dénudation ◇ **denudation** ◇ **diguzhañ** Lakaat a-wel ur wazhiedenn, un organ, h.a., dre flañchañ an amwiskadoù.

dénu-, dénud-

- *dénudation du sommet du crâne* moaladur kern ar c'hloppenn • *dénué d'anomalies cellulaires* hep gwariadenn gelligel • *petites aires incomplètement dénudées* tachadoù bihan damzivlevet • *protéine dénuée de chaînes légères* protein hep digorvelloù skañv.

dénutrition ◇ **denutrition** ◇ **1 isvezhur g. 2 disvezhur g.** 1 Direizh ar mezhur naouus dre reñver an eznevid war an ennevid. 2 Derez olañ an isvezhur (sl. *athrepsie, cachexie, inanition*).

déontologie ◇ **deontology** ◇ **Dleadouriezh b.** Diskiblezh o plediñ gant dleadoù an dud a vicher, ar vezeion pergen.

déontologique ◇ **deontologic, deontological** ◇ **1 dleadek aa., dleadouriek aa. 2 dleadel aa., dleadourel aa.** 1 A-zivout un ober, un emzalc'h kempleg diouzh dleadoù ur vicher, diouzh endalc'hioù an Dleadouriezh. 2 A-zave d'an dleadoù, d'an Dleadouriezh.

déorsvergence, strabisme déorsvergent, hypotropie ◇ **deorsvergence** ◇ **loakrerezh g. iswar, iswariañ, iswarded b.** Loakrerezh diazerc'h naouus dre wariadur ul lagad war draoù.

dépendance ◇ **dependency** ◇ **estoue g.** Teskad an anadennoù bredel ha kreudel a ra da wezherioù 'zo (liaoù, drammoù), goude un amzer arveridigezh hir pe hiroc'h, bezañ diziouerus da gempouez bevedel ar gouzrec'h (sl. *accoutumance, addiction, assuétude, chimiodépendance, pharmacodépendance, physiodépendance, psychodépendance, toxicomanie*).

dépend-

• *chimiodépendance* kimioustoue • *dépendance physique et psychique de l'usage des médicaments* sujadur kreudel ha bredel da arver al liaoù • *dépendant à une drogue* estoue ouzh un dramm • *devenir dépendant* estoueaat • *manifestations pathologiques qui dépendent d'auto-anticorps* erzerc'hadoù kleñvedel e dalc'h unanantikorfou • *partie du cœur qui est habituellement sous la dépendance d'un autre centre* tared eus ar galon a zo ent voas dindan hol ur greizenn all • *pharmacodépendance* liaestoue, gwezherestoue, kimioustoue • *physicodépendance* kreudestoue • *psychodépendance* bredestoue • *produit provoquant la dépendance* estoueiad • *provoquant la dépendance* estoueiad • *rendre dépendant* estoueaat • *sujet dépendant* estouead.

dépersonnalisation ◇ **depersonalization** ◇ **distreüniñ** Azoniad bred, anezhañ paouez a emanaout ent korfel pe ent vredel, a santout bezañ an unan, a biaouañ an un pivelezh (sl. *étrangeté* : *sentiment d'~*).

dépigmentation ◇ **depigmentation** ◇ **dilivegañ** Steuz al livegad.

dépilation ◇ **depilation** ◇ **divleviñ** Kouezh ar blev, ha pa ve naturel (moalded), kleñvedel (er c'hirroze, da skouer), darvoudel (da heul ar skingurañ) pe gwezeladel (dre wered un *divlevuzenn* (Gl. *dépilatoire*) pe ur *c'hoavon divleviñ* (Gl. *crème dépilatoire*)); arveret e vez a-wechoù Gl. *dépilation* evel kenster da Gl. *épilation*, Br. *disleviñ*, araezad gwezeladel all, anezhañ lemel ar blev dre o difrapañ diwar-bouez ur *c'hoar disleviñ* (Gl. *cire épilatoire*) pe un *disvlevez* (Gl. *épilateur*) tredanel.

dépistage ◇ **detection screening** ◇ **diurnat** Imbourc'hñ reiizialek renet war hiniennoù ur strollenn war-benn dinoñ anaezioù dianat, da skouer ar bruskluniñ skolel, prouadoù an avufo B hag an haza war an danvez roerion wad (sl. *prévention*).

déplace-

• *alloesthésie, phénomène de déplacement de la perception* eiltuverzh, eiltuegezh ar merzhout, anadenn dreuzlec'hiadur ar merzhout • *déplacement de l'utérus en avant* dilec'hiadur ar grozh war raok • *déplacement de la courbe de dissociation de l'oxyhémoglobine* dilec'hiadur krommenn digediañ an oksihemoglobin • *déplacement désordonné et incessant dont sont animées les très petites particules en suspension dans un fluide* morloc'h dizurz ha diastal gant an eufl en arc'hoal ebarzh un heverenn • *déplacements vertébraux par une mobilisation forcée* darfiñverezh ar mellennoù • *la théorie freudienne du déplacement* arlakedenn freudek an treuzlec'hiañ • *sensation de choc et d'arrêt perçue lors du déplacement transversal de l'arrière-pied* santadur ur stok hag un harz pa laka an imbours'her treñv an troad da riklañ war dreuz.

déplétif ◇ **depletive** ◇ **gouleizhus** aa. En araez da zigreskiñ ar c'hementad liñvenn bezant er bevedeg.

dépétion ◇ **depletion** ◇ **1 gouleizhañ, gouleizh g. 2 gouleizhañ, gouleizh, gouvec'hiañ, gouvec'h g.** 1 Digreskiñ ar c'hementad liñvenn bezant er bevedeg, er gwad pe en ur reiiziaad. 2 Leiaat bec'h ur gevionenn bezant en ul liñvenn eus ar bevedeg pe stad o tisoc'h eus an kez leiaat (sk. : *gouleizh pe gouvec'h kaliom*).

dépôt, dépos-

• *affection due au dépôt de sels d'argent dans le derme* anaez diwar an daspugn haliou argant e-barzh an derm • *complexes immuns qui se déposent sur l'endothélium des vaisseaux* kemplezhioù hangaeel o c'houzidiñ en endotelienn ar gwazhied • *déposer une goutte de substance sur la peau* doññ ul lomm danvezenn war ar c'hroc'hen • *dépôts de cholestérol dans les tissus* koc'hionadoù kolesterol er gwiadoù • *imprégnation pathologique par des dépôts de sels insolubles de calcium dans les tissus* koc'hionadoù kleñvedel haliou kalkiom andileizh e-barzh ar gwiadoù • *la cystine se déposant dans les tissus* ar c'histin o koc'hionid er gwiadoù • *substance fibrinoïde déposée dans la média des artérioles* danvezenn fibrinoïdel daspugnet ebarzh krennsae an talmerennigoù.

dépression, état dépressif ◇ **depression, breakdown** ◇ **govid g., gouvidañ, diwaskadur g., diwaskadenn b., diwaskañ** Azoniad bredel bezant en un niver bras a gleñvedoù, naouus dre izeladur an noa (tristeze, enkreze, gwashaouriezh) hag an eniñv (asikted, fillidigezh), anyoul, heudadur bredel, gorregezh al loc'hañ hag an dezevout, prinded an hambout; hervez lies diarsell e rummer ar gouvidoù : hervez o arbennelezh, e tiforc'her ar *gouvidoù endeuat* (Gl. *dépressions endogènes*), hêrezhel peurliesañ, hag ar *gouvidoù erwezhiat* (Gl. *dépressions réactionnelles*), da heul un daraez buhezel, ar *gouvidoù dianargrad* (Gl. *états dépressifs postcommotionnels*) goude un daraez kloppenn, ar *gouvidoù lodek* en azonou un naoued nerval (kleñved Parkinson, ateroskleroz an empenn); hervez un oad ma c'hoarvezont, e teskriver ar *gouvidoù eizikvanel* (Gl. *dépressions climatiques*) gant ar merc'hed hag ar baotred, ar *gouvidoù rakkozhiadel ha kozhiadel* (Gl. *dépressions préséniles et séniles*); hervez ar bredanaezioù ez int un arvez anezho, ar *gouvidoù anrizhek* (Gl. *dépressions atypiques*), sellet evel skizofrenek, ar *gouvidoù neurozel* (Gl. *dépressions névrotiques*), h.a. (sl. *abattement, aboulie, anaclitique* : *dépression* —, *anxiété, contact, cyclothymie, inhibition, humeur, mélancolie, névrose, sthénie*).

dépression d'involution ◇ **involutional depression** ◇ **govid atreñ** Skoulad a neuz velankolek o tarvezout goude an oad a bement vloaz gant gouzviaded hep diagentoù gouvidel, naouus dre an enkreze, an dodennoù hipokondriak, ha peurliesañ dre ezvezañ an heudadur.

dépressothérapie ◇ **depressotherapy** ◇ **diamwaskurañ** Arver ur gaelog diamwaskañ evit prederiañ tanijennoù henek ar c'hevioù lezfrï dre o adaergavennaat; an amkan eo skarzhañ al lin a zo enno hag o digeriñ d'an aergelc'h en-dro.

dépress-, déprim-

• *déprimer l'immunité* gouzizañ an hangae • *insectes au corps déprimé* amprevaned pukadek o c'horf • *dépressuriser* diamwaskañ • *épisode dépressif* skoulad gouvid • *la surface libre du liquide se relevant ou se déprimant au voisinage de la paroi* vol al liñvenn o c'horren pe o c'houzizañ ouzh ar speur • *le côté de l'utérus le moins dépressible* kostez kaletañ ar grozh • *mince membrane séparant l'une de l'autre les deux oreillettes et présentant sur sa face droite une dépression* lienenn voan o tispartiñ an daou

gentez, ur bukadenn war he zalbenn dehoù • *situation de dépression immunitaire* saviad gouziz an hangae • *tendances dépressives* tuadurioù gouvidel.

déráp-

• *denture andidérapante* dent disramp.

dératisation ◇ **deratization** ◇ **disrazhedañ** Distrujañ reizhiadek ar razhed war al listri, er sanailhoù, er stalioù, h.a., darbar dizarbenn ouzh treded ar vosenn hag ar c'hleñvedoù a vez ar razhed ar gwezher treuzkas anezho pe war eeun pe dre hanterezh o arvevad.

dérépression ◇ **derepression** ◇ **disgoudaviñ, disgoudav** g. En Hiloniezh, skoilhañ ouzh ar gen a harz (a c'houstav) ent reol bevennoz un danvezenn, ur protein da skouer; stadet eo bet ar vezañs eus disgoudaverioù e-kerz kleñvedoù 'zo, da skouer, an alfafetoprotein e kankr kentael an avu.

1 2 3 dérivation ◇ **1 derivation 2 lead 3 derivation** ◇ **1 amdreugañ, amdreug** g. **2 3 amdreugad** g. 1 Adsavelañ ar red en ur ganol aet anforzhzek, dre skarvañ ent surjanel al lodenn anezhi loet en argrec'h d'ar stankadur ouzh al lodenn loet en ardraoñ; da skouer er surjianerezh koazhadel, ez amparer un amdreugad etre ar sac'henn hag ar c'holon a-ziskenn evit ober d'an trehent skoeviñ ar c'holon treuz stanket gant ur yoc'henn (sl. *cæcocolostomie*); e surjianerezh ar galon, ez imbouder un tamm gwazhiedenn unanien pe gevanaoz war dreug un dalmerenn evit amsaviñ ur parzh stanket anezhi hag adsavelañ lanv ar gwad (sl. *pontage, shunt*). 2 Er Galonouriezh, mod kennaskañ daou elektrod ar c'holonvarrwezer ouzh ar gouziviad; hervez ar poentoù ma lec'hier an elektroduù, e tiforc'her : 1) an *amdreugadoù trobarzhel* (Gl. *dérivations périphériques*) kennasket ouzh an izili, 2) an *amdreugadoù argalonel* pe *vruskel* (Gl. *dérivations précordiales* ou *thoraciques*); hervez an arc'hwel debarzhet da bep elektrod e tiforc'her : a) an *amdreugadoù reolat* (Gl. *dérivations standard*) ma talvez an daou elektrod d'an arc'hwiliañ, b) an *amdreugadoù unvleñ* (Gl. *dérivations unipolaires*) arveret en erc'hwiliañ argalonel hepken, renet dre un *elektrod nebek* (Gl. *électrode indifférente*) erret ouzh ar bonn kreiz hag un *elektrod erc'hwilier* (Gl. *électrode exploratrice*) a arloer ouzh poentoù savelet eus ar rannbarzh argalonel (sl. *borne centrale*). 3 En empennvarrezañ, mod kennaskañ an elektroduù erc'hwilier ouzh poentoù dibarek eus ar brigenn (sl. *électroencéphalographie*).

dérivation du liquide céphalorachidien (LCR) dans l'hydrocéphalie ◇ ◇ **amdreugañ al liñvenn benn-kein (LPK) en empennfoeñv** Kevaraezañ karzhadur trebadek al liñvenn benn-kein azdalc'het e kambroù an empenn da heul stankadur ar forzhioù divereñ reol, arbenn an empennfoeñv, dre savelañ ent surjanel ur gwehennadur, pe etrezek ar forzhioù assugañ naturel ez eo an ogleñnoù endan-gevniked (*amdreugañ kambr-oglenñ*, Gl. *ventriculocisternostomie*), pe etrezek tachadoù assugañ ezkloppennel dre hent ur c'hataet o saniañ an LPK d'ar galon (*amdreugañ kambr-kentez*, Gl. *ventriculoatriostomie*) pe da gavenn an ampeleñ (*amdreugañ kambr-ampeleñ*, Gl. *ventriculopéritonéostomie*).

dériv-

• *circuit de dérivation* amdreugad • *dérivation de la bile à l'extérieur* distreugañ ar vestl d'an diavaez • *dérivation de la totalité du sang veineux avant son arrivée dans le cœur droit jusqu'en aval du cœur gauche* amdreugañ ar gwad gwazhiennel en e bezh adalek argrec'h ar galon dehoù betek ardraoñ ar galon gleiz • *dérivés de la morphine* deveradoù diouzh ar morfîn • *dérivés de la pénicilline* deveradoù a'r penikillin • *dérivés semi-synthétiques* deveradoù damgevanaozel • *ensemble d'individus ou de cellules dérivés par reproduction asexuée du même individu ou de la même cellule* teskad hiniennoù pe kelligoù evodet dre ouennañ anrevel diouzh an un hinienn pe diouzh an un kellig • *intoxication par le brome ou ses dérivés* pistriadur gant ar brom pe gant kediadoù ar brom • *opérer une dérivation palliative* savelañ un amdreugad goustegus • *tumeur développée aux dépens des cellules argentaffines des organes dérivés de l'intestin primitif* yoc'henn evodet diwar gelligoù argantlen an organoù o tont eus an arc'hpavez • *voie biliaire accessoire branchée en dérivation sur la voie biliaire principale* adforzh vestl skourret en amdreug ouzh ar bennforzh • *voie de dérivation fœtale qui permet au sang de l'artère pulmonaire de rejoindre l'aorte sans passer par les poumons* forzh o skoeviñ skevent ar grouell dre amdreugañ gwad an dalmerenn skevent etrezek an aortenn.

dermabrasion ◇ **dermabrasion** ◇ **kroc'henvliañ, bligurañ** Hentenn yac'hadel anezhi reñviañ ar c'hroc'hen evit dilemel ar gwiskadoù gorre anezhañ.

dermalgie, dermatalgie ◇ **dermalgia** ◇ **kroc'henost** b. Laur emdarzh er c'hroc'hen en ezvezañs a nep anaf stadadus; aozerion 'zo a astenn erdal an termen d'al laurioù kroc'hen a orin nerval (tabez).

dermatite, dermite ◇ **dermatitis** ◇ **kroc'henfo** g. Tanijern ar c'hroc'hen.

NOTENN : Hervez an aozerion e vez arveret Gl. *dermatite* ha *dermite* da envel an un anaevioù ha bepred klokaet gant ur spizer, sk. : *dermatite de contact* pe *dermite de contact*; a-geñver, ne gaver nemet Sz. *dermatitis*.

dermatite atrophique lipoïdique, maladie d'Oppenheim-Urbach ◇ **Oppenheim's disease** ◇ **kroc'henfo isteñvus lipoïdek, kleñved Oppenheim** Kleñved kroc'hen dibaot o tizhout an diabeteion peurliesañ, naous dre ar vezañs eus koc'hionadoù lipoïdek e gweleadoù endan-vegennoù an derm, o tedeññ gorrek trema ar pare.

dermatite des nageurs, gale des nageurs ◇ **swimmers' itch** ◇ **kroc'henfo an neuñverion, kravien** b. **an neuñverion** Anaez kroc'hen diwar sankidigezh furkokerker eus skistozom loenel e-barzh amwiskadoù an dud ma vanont bac'het.

dermatite exfoliatrice des nouveaux-nés ◇ **Ritter's disease, scalded skin syndrome** ◇ **kroc'henfo dispelius an nevez-c'hanidi** Seurtad *eritroderma* o teraouiñ e sizhunvezhioù kentañ ar vuhez e rezh gloevannoù lec'hiet en dremm ha, da heul, un eritem a ya war hollekaat, ur gourc'hennadur sec'h ha terzhienñ, o tedeññ d'ar marv en hanter eus an degouezhioù.

dermatite herpétiforme, maladie de Duhring-Brocq ◇ **Duhring's disease** ◇ **kroc'henfo erorvanek, kleñved Duh-ring** Seurtad *kroc'henfo liesstumm laurus* naouus dre vent vihan ar gloevennoù, heñvel ar re-mañ ouzh c'hwezigennoù an eror; kevredet e vez alies gant angougemer ar gluten (sl. *maladie cœliaque, système HLA*).

dermatite lichénoïde purpurique et pigmentée, maladie de Gougerot-Blum ◇ **lichenoid purpuric and pigmented dermatitis of Gougerot and Blum, Gougerot-Blum disease** ◇ **kroc'henfo likenoidel purpurek ha livegennek, kleñved Gougerot-Blum** Seurtad *korrwazhiedfo kroc'henel* naouus dre un dispuilhad henek pikoù ruz likenoidel, balirek, gourc'hennus a-wechoù, loet a-gemparzh war an izili traoñ.

dermatite primulaire ◇ **primrose dermatitis** ◇ **kroc'henfo ar bokedoù laezh** Tanijenn groc'hen dec'honet diwar stekiñ ouzh ar bokedoù laezh.

dermatite serpigineuse, dermatitis repens ◇ **dermatitis repens** ◇ **kroc'henfo daremstlej** Seurtad kroc'henfo poreek an eizhaennoù, heuliat d'un dараез ivinoù pe d'un troivinfo, naouus dre pugnezoù bihan, war gemm dizehan bevennoù an tachad ma nodont.

dermatoglyphe ◇ **dermatoglyphe, dermatoglyphics** ◇ **kroc'henrezh g.** Tresoù furmet war balvoù an daouarn, solioù an treid ha begoù ar bizied gant plegoù ar c'hroc'hen, kribennoù hag ervennoù an ezkroc'hen hag ar c'hefluniadur anezho e linennoù, dolennoù ha punelloù; pouezus eo studiañ ar c'hroc'henrezh e tro ar gouskoevad kromozomel (sl. *dactyloscopie*).

dermatologie ◇ **dermatology** ◇ **Kroc'henouriezh b.** Diskiblezh vezegel o plediñ gant ar c'hroc'hen, ar glaourgennoù kefin hag ar faneroù.

dermatolyse, chalazodermie, cutis laxa ◇ **dermatolysis** ◇ **kroc'henusgad g.** Kammeuziad oc'h ober d'ar c'hroc'hen, e rannbarzhioù 'zo (malvennoù, divvoc'h, kof, organoù genel), laoskaat ha hiraat.

dermatome¹ ◇ **dermatome** ◇ **edvider g. -ioù, dermatom g.** Meni aotenn a arverer da erlemel tammadoù kroc'hen e sell d'an imboudañ.

dermatome² ◇ **dermatome** ◇ **dermatom g.** Tachad kroc'hen nervaouet gant un div wrizienn a-gein a 'n nervennoù alivenn, a c'haller tresañ ar bevennoù anezhañ war goulun ar c'horf.

dermatomycose ◇ **dermatomycosis** ◇ **mikoz g. ar c'hroc'hen, dermatomikoz g.** Anvad rumm evit ar c'hleñvedoù kroc'hen devoudet gant foue arvevat (*dermatofit*) : tagn, epidermofitiez, onikomikoz, trikofitiez.

dermatomyosite ◇ **dermatomyositis** ◇ **dermatomiozit g.** Aneaz dianav e arbenn, naouus dre un eritem hag ur gouliñv o teraouiñ en dremm hag oc'h emastenn d'ar gouzoug ha d'an daouarn, un tizhadur kemparzhiek eus kigennoù ar c'hef hag an izili (isnerzh, isteñv, laurioù strewek), un derzhienn hag un distresadur a 'r stad hollek; dedreiñ a ra afrapadoù, trema ar marv en hanter eus an degouezhioù, trema arlenadoù grevus (isteñv kroc'hen, isteñv ha dargrezañ kigennoù) en hanter all; tennañ a reer hiziv da renkañ an dermatomiozit e-touez kleñvedoù ar c'hollagen ekichen ar skleroderma hag al lupuz eritematus strewek (sl. *polymyosite*).

dermatoscopie ◇ **dermatoscopy** ◇ **kroc'henarselliñ** Hentenn ensellout war ar bev gorre ar c'hroc'hen diwar-bouez ur c'horrgresker (sl. *capillaroscopie*).

dermatose, dermopathie ◇ **dermatosis, dermatopathy** ◇ **kroc'henad g., kroc'henanaez g., dermatoz g.** Anvad rumm anaezioù ar c'hroc'hen.

dermite de contact, eczéma de contact ◇ **contact eczema, contact dermatitis** ◇ **ekzema diarstok, kroc'henfo diarstok** Dispuilhad devoudet gant gwezherioù kizidikaus (liaoù, nikel ha metaloù all, danvezzennoù proteek, lateks) (sl. *dermatite, eczéma de contact*).

NOTENN : Arveret e vez Gl. *dermite (dermatite) de contact*, Sz. *contact dermatitis* evel kensterioù d'an anvad dik : *eczéma de contact, contact eczema*, evel, a du 'rall, Gl. *dermite artificielle*, Sz. *industrial dermatitis* a-genster d'an anvadoù reishoc'h Gl. *eczéma aigu, Sz. acute eczema* (Br. *ekzema lemm*).

dermite des rayons X, radiodermite ◇ **radiodermatitis, roentgen ray dermatitis** ◇ **kroc'henfo diwar skinoù X, skingroc'henfo g.** Anaf kroc'hen pe glaourgenn devoudet gant ar skinoù X hag an danvezzennoù skinoberiek; dezhañ daou zegouezh : 1) *darvoudoù yac'hadel*, pe kentrat (eritem, gouliñv, c'hwezigennoù ha gloevennoù), pe goulerc'hat (kroc'hen liveget, argaledet, isteñvek, korrwazhiedusvoll, a-wechoù gouliezoù); 2) *darvoudoù micherel*, anezho isteñv ha skleroz ar c'hroc'hen, gouliezoù diek ha laurus, riskl an dedro kankrel.

dermo-épidermite infectieuse ◇ **infective dermatitis** ◇ **kroc'henfo poreel** Poread an amwiskad, diwar strepokok peur-liesañ, e rezh plakadoù eritematus sec'h pe dourasennus (sl. *érysipèle*).

dermocorticoïde ◇ **topical corticosteroid** ◇ **kortikoid g. lec'hwezhus, dermokortikoid g.** Angevezh, ennañ kortikoid da von, amkanet d'an arver kroc'henourel (ogan, koavon).

dermogramme ◇ **cutaneous imprints** ◇ **kroc'henrestrad g., dermogramm g.** Deluniañ kementadel ha doareadel ar c'helligoù dastumet war ul lavnenn wer bet arloet ouzh un edvidad kroc'hen fresk.

dermographie, dermographisme, autographisme, dermatose stéréographique ◇ **dermographism** ◇ **regwezañ kroc'henel** Erwezhañ a-berzh ar c'hroc'hen ma anad warnañ e rezh ul linenn ruz o tont gwenn ha balirek ar roud treset gant un draezenn vegek; anadenn a zispleger dre wered an histamin hag ar serotonin dilaosket gant ar mastokit.

dermoïde ◇ **dermoid** ◇ **dermoidel** aa. A-zivout ur gwiad a zo heñvel e luniad ouzh hini ar c'hroc'hen.

dermotrope ◇ **dermotropic** ◇ **1 kroc'hengerc'h** aa. **2 kroc'hengerc'hus** aa. 1 A-zivout an danvezennoù kimiek, ar garvevion, ar viruzoù ganto ar perzh da lenañ ent hanbarek ouzh ar c'hroc'hen hag ar glaourgennoù. 2 Tuet da groc'hengerc'hañ.

dermotropisme ◇ **dermotropism** ◇ **1 kroc'hengerc'hañ, kroc'hengerc'h** g. **2 kroc'hengerc'husted** b. 1 Lenañ ent hanbarek ouzh ar c'hroc'hen hag ar glaourgennoù. 2 Tuadur da groc'hengerc'hañ.

dermovaccin ◇ **dermovaccine** ◇ **kroc'henvaksin** g. Vaksin dec'honet dre enkoriñ ar viruz vaksinel er c'hroc'hen end-eeun.

derm-

• *affections dermatologiques* kleñvedoù kroc'hen, anaezioù kroc'hen • *cataracte syndermatologique* ferennlug sergroc'henad.

dérotation ◇ **derotation** ◇ **dienc'hwelañ** Prederiañ surjanel enc'hweladur andreadus an ezel krec'h (da heul seizi gwiliouel plezhad ar vrec'h) pe an ezel traoñ (da heul disvellad ganedigel al lez), o c'hoarvezout a skejañ treuzenn ar paler pe an askorn morzhed, ober d'al lodenn draoñ treiñ war ziaevaz hag he diloc'hekaat dre gestedañ an askorn en e furn nevez e doare da reiñ d'an ezel un emlakadur bonan.

déroulement de l'aorte, déroulement aortique ◇ **aortic enlargement, tortuosity of the aorta** ◇ **digrommadur** g. **an aortenn** Arvez skinlunadel an aortenn, bolbosek he speur, muiaet he c'havnez hag he skin krommder, skeudenn azonus d'an ateroskleroz.

Derry : **maladie de ~, syndrome de ~** ◇ **Derry's disease, Derry's syndrome** ◇ **kleñved Derry, azoniad Derry** Seurtad mabanel ar gangliozidoz dre GM1, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, oc'h erzerc'hañ etre ar 6t hag an 20t miz, da azonoù dezhañ ankedre, loakrevezh, dilerc'hegezh vred, reuter ec'hempennned, marvus araok an oad a 10 vloaz.

désadaptation cardiovasculaire à l'effort ◇ **loss of cardiovascular exercise adaptability** ◇ **koll an azasadusted kalon-gwazhiedel diouzh ar strivañ** Gwered ar sevel goude ur gourvez difiñv hirbad, anezhañ ustead kalon, trec'hwez, iswark warsavel.

désafférentation, déafférentation ◇ **deafferentation** ◇ **1 andegasad** g. **2 dizegasadiñ** 1 Steuz an eraeziñ e dianlen tizhadur ar forzhioù nerval degasad. 2 Gwezh war ar forzhioù nerval degasad evit dec'han steuz an eraeziñ.

désafférentation : **douleur de ~** ◇ **deafferentation pain** ◇ **laur** g. **andegasadel** Poan a-geñver gant un anaf war forzhioù degasad an nervreizhiad trobarzhel, merzhet en ezvezañs a nep fraouad argevezus, dezhi lies rizh klinikel : aneraez laurus, uc'hanglev, berioù daredek ; stadet goude an ambidañ (laur ar voñsenn, ezel tasmant), an diskogad, ar senkl, al liesnervennfo.

désafférenté ◇ **deafferented** ◇ **1 andegasadek** **2 andegasadel** **3 dizegasadet** 1 Tizhet gant an andegasad. 2 A-zave d'an andegasad. 3 Stad ur parzh korf, ur gouziviad goude an dizegasadiñ.

désamination ◇ **desamination** ◇ **dezaminadur** g. Dispenn un amindrenken dre goll ur bonad amin ha dre ziw an drenken getonek hag amoniak ; anezhañ pazenn eus kozhadur ar protid, gwezhiet er bevedeg dre araez un enzim, an dezaminaz.

désarthrodèse ◇ **desarthrodese** ◇ **diglaviañ un arz, arzdiglaviañ** Lemel surjanel un arzkglaviañ (sl. *arthrodèse*).

désarticulation ◇ **disarticulation** ◇ **ec'harzañ** Seurtad ambidañ ma lakaer talenn ar skejañ da dremen dre ur c'henvell.

désassimilation ◇ **disassimilation** ◇ **disvevelaat** Ezvevennañ danvezennoù parzhiat er bevedeg (sl. *assimilation, catabolisme*).

Descemet : **membrane de ~, lame limitante postérieure** ◇ **Descemet's membrane** ◇ **lavenn** b. **vevennus adreñv** Kennenn loet e talbenn don ar gornsa, a-drek an danvezenn biaoel anezhi.

descemetocèle ◇ **descemetocoele** ◇ **deskemetogad** g. Aveleñn a-dreuz d'ar gornsa eus al lavenn vevennus adreñv.

descend/t-

• *côlon descendant* kolon a-ziskenn • *descente anormale du cordon au devant de la présentation* diskenn ezreol ar funig vegel dirak an erload • *incisure sur la ligne descendante du carotidogramme* ask war linenn diskenn ar garotidresenn • *l'anse de Henle avec une branche mince, ou descendante* kizenn Henle gant ur barr moan pe aziskenn • *la descende est le trajet parcouru par la présentation du détroit supérieur au plan du détroit inférieur* an diskenn eo an treug heuliet gant an erload etre digor krec'h al lestr ha talenn an digor traoñ • *la présentation est la partie du fœtus qui occupe l'aire du détroit supérieur du bassin avant d'y descendre* an erload eo al lodenn eus ar grouell o c'henniñ digor krec'h al lestr kent diskenn drezañ.

-dèse

• *arthrodèse* arzkglaviañ • *désarthrodèse* diglaviañ un arz, arzdiglaviañ • *déséphysiodèse* diglaviañ un dalpenn, talpenndiglaviañ • *éphysiodèse* talpennglaviañ.

déséfférentation : **syndrome de ~** ◇ **defferentation** ◇ **anezkasad** g., **azoniad an anezkasad** Span arc'hwel ar forzhioù ezkasat, naous dre steuz al loc'hañ (sl. *désafférentation, verrouillage* : *syndrome de ~*).

désensibilisation ◇ **desensitization** ◇ **digizidikaat** Araezad amkanet da lemel kizidigezh ezreol gouziviaded 'zo ouzh korfoù na erwezh ket outo an darn vuiañ eus an dud all, anezhañ diouñt ent arreat an danvezenn antigenek a zoenoù argresker (prederiadur an ekzema, an asma, ar bleuzoù diwar vinim an himenopter).

déséquilibre ◇ **disequilibrium** ◇ **anemgempouez** g. Koll an emgempouezañ, eleze ar c'hedarc'hwelañ etre ar gweled, ar benvegad rakkambrel hag an eraeziñ endon- hag anunfraouadel ampletat da reolerezh loadur ar c'horf e-keñver ar c'hwimmoù ha lakadur parzhioù ar c'horf an eil re e-keñver ar re all (sl. *équilibre*).

déséquilibre ◇ **disequilibrium** ◇ **1 digempouez g. 2 ec'hwastad g.** 1 (Keal hollek) koll an ingalded etre ar c'hedrannoù kevenep (nerzhoù, gwezharioù, h.a.) amplegat da badelezh un unvez (stad, trevnad, bevedeg, h.a.) (sl. *équilibre, équilibre*). 2 (Er Vevedouriezh) digempouez e par an arc'hwelioù, direizhadur eus an arwastadiñ (Gl. *homéostasie*), eleze eus an tued da zerc'hel ar gwastadennoù bevedel (Gl. *constantes physiologiques*) etre o hinou reol.

déséquilibre alimentaire : **syndrome du ~** ◇ **food imbalance** ◇ **azoniad ar boued digempouez, digeventel g. boued** Strafulhoù diwar ezreolled ar c'henfeur etre elfennoù ar boued : ustroazh, gouliñv, istead kalon, skleroz talmerel a stader gant gouziviaded a zo bet o magadur pell amzer divastus ha digempouez (sl. *équilibre nutritionnel*).

déshydrase, déhydrase, déshydrogénase ◇ **dehydrase, dehydrogenase** ◇ **dehidraz g.** Enzim o treluskañ dilaosk an hidrogen eus ar molekul bevel da geñver an oksidañ anezho; spesadel eo an dehidrazoù d'ar molekul a zihidrogenont, sk. : an *dehidraz laktek (LDH)*, an *dehidraz malek*, ar *sorbitol dehidraz*, h.a.

déshydratation ◇ **dehydration** ◇ **dourisvec'hiañ, dourisvec'h g.** Koll dour gant ar bevedeg.

déshydratation extracellulaire : **syndrome de ~** ◇ **syndrome of extracellular dehydration** ◇ **azoniad an dourisvec'h ezkelligel** Azoniad naoues *ent vevoniel* dre leiadur kementad hollek an natriom hag an dour ezkelligel ha, da heul, gwadfetisiñ a-ser gant reolled ar gwadvec'h natriom ha grenn ar plasma, *ent klinikel* dre an asikted, sec'hded an amwiskadoù, kalonustead hag iswask talmerel, istroazh ha gwadusvec'h urea; devoudet e vez gant ar c'holl dour koazhadel (dre ar c'hwelñ pe an darc'hoal), kroc'heneel (c'hweziñ) pe lounezhel (skorted uslounezhel padek, koma diabetien, lounezho); prederiet e vez dre ziounit dour ha hollen.

déshydratation (intra)cellulaire : **syndrome de ~** ◇ **syndrome of (intra)cellular dehydration** ◇ **azoniad an dourisvec'h enkelligel** Teskad azonoù diwar usgrenn ar plasma : itik, sec'hded glourenn ar genoù, koll pouez, asikted, morgud, trec'hwezh, terzhienn vihan, istroazh, gwadusvec'h urea; azoniad dec'honet gant usvec'h kevionnoù ar plasma (natriom) hag ar c'holl dour, pe lounezhel (diabet heuz, skorted lounezh), pe koazhadel (c'hweladurioù, darc'hoal, suc'hadur stomok, skorted an euvriñ dour), pe kroc'heneel (c'hweziñ), pe analadel (briantenbenañ); da rouestlad e c'hell darvezout ar c'homa uc'hosmoler; ar prederiadur eo diounit dileizhennoù isgrennek hag erskrivañ ur reol voued hep hollen.

déshydrogénation ◇ **dehydrogenation** ◇ **dihidrogenañ** Dilaoskiñ hidrogen da geñver an oksidañ.

désigner

- *les gonosomes, désignés par X et Y* ar gonozomoù, arouezet dre X ha Y.

désinfectant ◇ **disinfectant** ◇ **1 dilouezus aa. 2 dilouezur g. -ioù** 1 En araez da zilouezañ. 2 Danvezenn dilouezus.

désinfection ◇ **disinfection** ◇ **dilouezañ, dilouezerezh g.** Dstrujañ ar garvevion kleñvedus hag ar meteier bevel ma tiñvont, diwar-bouez araezioù fizikel (gwrez), kimiek (dilesterioù), treloc'hel (broustañ, gwelc'hiñ); er meteier surjaniel e tilouezur an daouarn, an dilhad, kroc'hen korf a-bezh ar gouziviad, ar vaezienn oberata pergen ha kement traevann bezant er sal oberata.

désinfestation ◇ **desinfestation** ◇ **dierialañ, dierialerezh g.** Dispeuziñ spesadoù loened noazer, termen arveret evit a sell ar c'hrigner hag an artropod erialer (sl. *infestation*).

désinhibition, dissociation neurale ◇ **disinhibition** ◇ **diheudañ** Dieubiñ ar c'hreizennoù nerval izelañ, endan-bluskenn, diouzh reolerezh ar c'hreizennoù uhelañ; termen dispis an askont d'un arver bredoniel anezhañ a ro da genster 'pluskennel' ha 'diarvenn', 'endanbluskennel' ha 'diarzoug'.

désinsectisation ◇ **disinsectization** ◇ **diamprevanañ, diamprevanerezh g.** Arloañ amprevanlazherioù.

désinsertion ◇ **disinsertion** ◇ **dizenlenañ** Digrakañ ur gigenn, ur stirenn pe ul lienenn diouzh o lec'h enlenañ.

désintégration phonétique ◇ **phonetic disintegration** ◇ **difloskiñ soniadel** Teskad strafuilhoù ar c'hevaotañ bezant en ankomez Broca (ankevaot) (sl. *anarthrie, aphasie de Broca, articulation 2*).

désintégrer

- *le radiocésium se désintègre en émettant un rayonnement β^-* digevanañ a ra ar radiokeziom en ur leuskel ur skinad β^- .

désintoxication ◇ **1 detoxication 2 disintoxication** ◇ **1 dibistriañ 2 digaezhiañ** 1 (Arver dispredet) argerzh gwezhiet gant ar bevedeg evit ezvevannañ an toksinoù. 2 Prederiañ un estouead (ouzh an alkool, ur bader, ul lia) dre embreger gantañ ur *gur digaezhiañ* (Gl. *cure de désintoxication*).

desmodonte, TA desmodontium ◇ **desmodontium** ◇ **amzantenn b.** Stagell logig-dant (bet anvet PNA *periodontium*).

desmodontite ◇ **desmodontitis** ◇ **amzantennfo** Tanienn an amzantenn.

desmodontose ◇ **desmodontosis** ◇ **amzantennad b., desmodontoz g.** Klañvadur an amzantenn naoues dre an dic'henezhadur anezhi, muiadur an esaouenn logig-dant ha distrantelled an dant.

desmoïde : **tumeur ~, desmome, fibrome desmoïde, fibrome récidivant** ◇ **desmoma** ◇ **desmom g., fibrom g. desmoïdel** Yoc'henn o c'hoarvezout a wiadennoù evodet eus ar mezenkim, loet er c'hroc'hen pe e kigennoù speur ar c'hof, a seller evel ur seurtad sarkom lec'hiek amyud.

desmolase ◇ **desmolase** ◇ **desmolaz g.** Enzim en araez da zifloskiñ digorvelloù karbonek ar molekul en ur zilaoskiñ kementadoù gremm bras.

desmopathie ◇ **desmopathy** ◇ **stagellanaez g.** Klañvadur ar stagelloù.

desmoplastique ◇ **desmoplastic** ◇ **stirweat** aa. O tec'han furmadurioù stirek, fibroz pe glenelloù.

desmopressine, dDAVP ◇ **desmopressin, dDAVP** ◇ **desmopresin** g., **dDAVP** Deverad kevanaoz diwar an hormon eneptroasheiat (vazopresin), diounezet ouzh an diabet heuz hag an ardroazhañ, arveret ivez evel gwadkaeat.

desmorrhexie ◇ **desmorrhexis** ◇ **stagellfreg** g. Rog ar stagelloù.

désoblitération artérielle, désobstruction artérielle ◇ **arterial thrombectomy** ◇ **disteviañ un dalmerenn, trombuzez-venañ** Dilemel ur c'horf estren (un trombus peurliesañ) diouzh oaled un dalmerenn.

désodé, asodé ◇ **sodium free** ◇ **diholen** aa. Hep halioù natriom, a-zivout ar boued, ur reol voued.

désord-

• *désordre anatomique* direizh neuziadurel • *désordres bronchopulmonaires* strafuilhoù bronkez-skevent • *mouvement désordonné et incessant dont sont animées les très petites particules dans les fluides* morloc'h dizurzh ha diastal gant an eufl en arc'hoal e-barzh un heverenn.

désorientation ◇ **disorientation** ◇ **ezaouiñ** Strafuilh eus an emloañ en egor hag en amzer hag ivez a-wechoù eus goulun an emgorf.

désorption ◇ **desorption** ◇ **ec'hamsunañ** Dispartiañ ur volekulenn, un ionenn pe un atomenn diouzh ar gorre liñvel pe sonnel he amsune.

désocorticoïd ◇ **desocorticosterone** ◇ **dezoksikortikosteron** g. Danvezenn gevanaoz o kevaraezañ lenadur an natriom hag an dour ha degorzhadur ar c'haliom; blivaat a ra gwezhierzh ar c'higennoù.

désoxyribonucléique : acide ~ **ADN, DNA** ◇ **deoxyribonucleic acid, DNA** ◇ **trenkenn dezoksiribonukleek, DNA** Keur-volekul polimer, danvez ar c'hromozomoù, dezhañ furm daou arrevell troellennek kempunet o c'hoarvezout a bep eil a strolloù sukr (dezoksiriboz) ha fosfat, da bontoù etrezo strolloù bazennoù nitrogekek, purek (adenin ha guanin) pe pirimidek (kitozin ha timin); bodad an teir c'hedrann (suks, fosfat ha bazenn nitrogekek) a ya d'ober un nukleotid, anezhañ unvez kentael an DNA oc'h amparañ ar gen, skor d'an doareennoù hêrezhel (sl. *base 4, chromosome, cistron, code génétique, codon, gène, hérédité*).

despiciens ◇ ◇ **traoñdreñ** A-zivout gwiennoù an nervennoù loc'hañ o treiñ an daoulagad war draoñ.

desquamation ◇ **desquamation, peeling** ◇ **gourc'hennañ** Dispeliañ an epiderm e rezh koc'higennoù poultrek pe plakennoù bras pe vrasoc'h.

desquamation collodionnée du nouveau-né, desquamation lamelleuse du nouveau-né ◇ **lamellar exfoliation of the newborn** ◇ **gourc'hennadur g. kollodion an nevezc'hanidi, gourc'hennadur lavnek an nevezc'hanidi** Dispeliadur e rezh lavnennoù munut o c'hoarvezout dibaot e deizioù kentañ ar vuhez hag o parañ goude un nebeut devezhioù; dermatoz renket e stern ar stadoù iktioziform ganedigel (sl. *bébé collodion, dermatite exfoliatrice des nouveaux-nés*).

desquam-

• *cellules épidermiques desquamées* kelligoù ezkroc'hen gourc'hennet • *cheilite desquamative* gweuzfo gourc'hennus • *desquamation de pneumocytes granuleux* gourc'hennañ pneumokit greunek • *desquamation persistante* gourc'hennañ padek • *pneumonie desquamative interstitielle* skeventfo gourc'hennadel entremezel.

destin-

• *couronne destinée à recevoir la face occlusale de la dent* kurun he amkan enderc'hel talbenn keharzel an dant • *ensemble de pièces destiné à soutenir une partie du corps* teskad pezhioù amkanet da harpañ ul lodenn eus ar c'horf • *procédé chirurgical destiné à effacer une cavité* araezad surjaniel evit kas da get ur gavenn • *réceptacle contenant de la chaux sodée destinée à absorber le CO₂* rejeté endalc'her ennañ soda-raz e gefridi desunañ ar CO₂ distaolet • *soluté destiné à être administré sous forme buvable ou injectable* dileizhad erbarek da vezañ diounezet dre euvriñ pe dre ensinklañ • *système nerveux sympathique à destination oculaire* nervreizhiad simpatek en erdu al lagad.

destruc-

• *la destruction des canaux biliaires* distruj ar forzhioù bestl • *la destruction physiologique du caillot* dispenn bonan ar gaouledenn • *la production et la destruction des éléments figurés du sang* parañ ha loezañ elfennoù luniek ar gwad • *tendance à la destructivité* doug d'an distrujusted.

détach-

• *détachement de la réalité* distroc'h diouzh ar gedvuhez • *mode de sécrétion exocrine dans lequel le pôle apical des cellules se détache* doare ur wagrenn ezvorc'hañ ma tifreg blein kern ar c'helligoù.

détection ◇ **detection** ◇ **dinoiñ** Arglask ha dizoleiñ (un danvezenn, un anadenn fizikel, bevedel, h.a.).

délect-

• *anticorps détectable à basse température* antikorff dinoadus er gwrezverkoù izel • *détecteur de rayonnements ionisants* dinoer skinadou ionaus • *détection et mesure* dinoerezh ha muzulierezh • *génant la détection des signaux utiles* o tiaesaat dinoadur an arhentou arverek • *moyens de détecter la présence du virus dans l'organisme* araezioù evit dinoiñ bezañ ar viruz er bevedeg • *permettant la détection des anticorps* o reiñ tro da zinoiñ antikorfoù.

déterger ◇ **to deterge** ◇ **diziblañ** Naetaat ur gouli kreudal pe diek ha krouizek, lemel kuit dioutañ ar saotr hag an tammoù marvennet, dazbevaat e vevennoù da aesaat ar c'hleizennañ.

détérioration mentale ◇ **psychic deterioration** ◇ **disleberñ bred** Teskad divigadoù bredel o tizhout an naoudezh, ar c'hounerezh, ar meizerezh, an dezeverezh, stadet en atreñ kozhiadel, en anaezioù dic'henezhadel an empenn pe e dianlen anafoù poreel, pistriell, daraezel, gwazhiedel (sl. *Alzheimer : maladie d'~, démence*).

détermin-

- *administration orale ou parentérale d'une dose déterminée* diouint dre euvriñ pe dre sankañ un doenad savelet
- *déterminant une affection bénigne* o tevoudañ un anaez kuñv
- *détermination du sexe* desavelañ ar rev
- *déterminer la position des gènes sur les chromosomes* savelañ loadoù ar gen war ar c'hromozomoù
- *génétiquement déterminé* hilampegadeg
- *infection déterminée par le vibrion cholérique* pore a zo e zevouder ar vibrion kolerek
- *le déterminisme est le rapport nécessaire entre les phénomènes* ar savelegezh zo ar c'heñver ret etre an anadennoù
- *les variations de pression déterminées par le mouvement de la pointe du cœur* argemmadoù ar gwask dec'hanet gant horos kern ar galon
- *maladie déterminée par des champignons blastosporés* kleñvedoù diwar foue blastosporek
- *propriété de deux gènes allèles d'exprimer l'un et l'autre dans le phénotype* les caractères qu'ils déterminent perzh gant div c'henenn allel da erzerc'haat o div er fenotip an doarenoù en o dalc'h
- *site ou déterminant antigénique* hanload antigen
- *substance pouvant déterminer l'apparition d'un diabète* danvezenn en araez da zevoudañ un diabete
- *toxi-infection déterminée par Bacteridium anthracis* pistriboread devoudet gant *Bacteridium anthracis*
- *trouble à détermination nerveuse* strafuilh a zevoudañ nerved.

détersif ◇ **detergent** ◇ **1 diziblus aa. 2 dizibler g. -ioù** 1 O kaout perzhioù diziblañ. 2 Danvezenn diziblus (sl. *abstergent*).

détersion ◇ **debridement** ◇ **diziblañ** Naetaat ur gouli kreuadel pe diek ha krouizek, lemel kuit dioutañ ar saotr hag an tammoù marvennet, dazbevaat e vevennoù da aesaat ar c'hleizennañ (sl. *abstersion, débridement*).

détoxication, détoxification ◇ **detoxication** ◇ **dibistriekaat** Neptuiñ pistriegerzh ur c'horf dre ober dezhañ kediañ ouzh danvezennoù all, gwezhiad renet *in vivo* pe *in vitro* (sl. *désintoxication*).

détransposition ◇ **switch** ◇ **digamloañ** Gwez surjanel evit dereizhañ kammloadur ar gwazhied bras (sl. *transposition des gros vaisseaux*).

détrésse néonatale ◇ **neonatal distress syndrome** ◇ **azoniad ankalez g. an nevezc'hanidi** Stad grevus kenan a-zalc'h ouzh an diaez eo evit an nevezc'hanidi (ar rakkoulzeion dreist holl) derc'hel o c'hempouez diabarzh, da azonoù dezhi dizurzhiou analadel, nerved, kennevidel.

détrésse respiratoire du nouveau-né ◇ **neonatal respiratory distress syndrome** ◇ **azoniad ankalez analadel an nevezc'hanidi** Azoniad stadet war an nevezc'hanidi, anezhañ trec'hwez war gresk, elanal ha dulaz; en tu all d'an arbennoù kalonel, nerved ha kammneuziadel ez eus tri orin : un dewntad liñvenn ammoniel, kleñved al lienennoù gwervanek, ur poread bronkezskevent; e-tal ar furmoù grevus-se e teskriver un *ankalez analadel dibad*, anvet c'hoazh *analustead dibad an nevezc'hanidi*, o c'hoarvezout goude ar ganedigezhioù dre gezarian diwar an dale assugañ al liñvenn enskevent krouellel hag o parañ dindan un nebeut eurvezioù pe devezhioù.

détrésse respiratoire de l'adulte ◇ **adult respiratory distress syndrome** ◇ **azoniad ankalez analadel an oadour** Skorted analadel lemm gant gouliñv skevent anafel e dianlen ur c'heuziad lestel pe pistriell, un dewntad liñvenn stomok da skouer; dre berzh mekadur ar gennenn logigoù-korrwazhied ez emsil ar plasma el logigoù hag ez emled lienennoù gwervanek war o speurioù, o tec'han ar goustouad anezho hag ur fibroz entremezel aloubus; da heul e tigresk filusted ar skevent hag e tarvez ur gwadisvec'h oksigen garv; en desped d'ar gwenterezh kalvezadel dre wask ec'hanalel muiel e vez bepred teñval an erbedad (sl. *défaillance multiviscérale, membranes hyalines : maladie des ~, œdème pulmonaire*).

détroit ◇ **strait** ◇ **1 digor g. -où 2 kulva g. -où** 1 Er Gorfadurezh, teir strizhenn a 'l lestr bihan : an *digor krec'h*, kenvenn al lestr bihan hag al lestr bras, etre ribl krec'h juntad ar c'haezour ha ribl araok ar c'henvell dargreiz-kroazell; an *digor traoñ*, etre ribl traoñ juntad ar c'haezour hag an askorm belost; an *digor krenn*, enkadur bihan o rannañ al lestr bihan etre daou hoskad, etre soutadur pezhioù 4–5 ar groazell ha trederenn draoñ ar c'haezour. 2 En Amiegouriezh, anvad a roer da zigoù al lestr bihan, peurgetket d'an digor krec'h, lec'h anankañ an erload.

détrusor ◇ **detrusor** ◇ **ec'holer g. -ioù** Furmadur kaherel ar c'hwezhiagell.

détruire, destru-

- *chorio-ādénome destruens* korioadenom kenkizus
- *détruire les bactéries pathogènes* dispenn ar bakteri kleñvedus
- *in vitro il agglutine et détruit les lymphocytes* in vitro e tazglud hag e tispenn al limfokit
- *lésions destructrices des centres nerveux* anafoù drastur ar c'hreizzennoù nerved
- *rechuter après exérèse ou destruction* adfeilhañ goude bezañ dilamet pe distrujet
- *substances détruites chez le sujet sain* danvezzennoù dispennet ent vonan er bevedeg
- *tumeur envahissant et détruisant le tissu ou le viscère où il se développe* yoc'henn oc'h aloubiñ hag o wastañ ar gwiad pe ar flugezenn ma teñv .

détubage ◇ **extubation** ◇ **ezpibañ** Lemel ar sont bet sanket er vrian dre ar c'harloc'henn (sl. *intubation*).

détumescence ◇ **detumescence** ◇ **digoëñvenniñ** A-zivout ur parzh korf bet muiaet e ec'honad, distreiñ d'e vent reol.

deutéranomalie, anomalie de Rayleigh ◇ **deuteranomaly, Rayleigh's anomaly** ◇ **gweriswel g., deuteranomaliezh b., gwariadenn b. Rayleigh** Gwerangwel leiek, gwariadenn c'hanedigel eus gwel al livioù.

deutéranopie ◇ **deuteranopy** ◇ **gwerangwel g., deuteranopiezh b.** Dic'halloud da verzhout al liv gwer (Gr. *deuvero* "eil", al liv gwer o vezañ an eil liv diazez) (sl. *achloroblesie*).

devancer

- *un symptôme de l'automatisme mental est la pensée devancée* un azon eus an darc'hwelerezh bred eo an dezevoudoù diaraoget.

développ-

- *absence de développement intellectuel et arrêt du développement somatique* andiorre kefredel hag aneroubar kreudel • *développement d'un embryon* diorreadur ur rizhell • *bourrelet fibreux se développant sur une cicatrice* andell stirek oc'h evodiñ diwar ur gleizenn • *le tissu sur lequel se développe la tumeur* ar gwiad ma teñv ar yoc'henn • *le type de tissu où se développe le cancer* ar rizh gwiad ma evod ar c'hankr • *lésion qui se développe sur place* anaf o teñvañ war al lec'h • *microbe qui ne peut se développer qu'en présence d'oxygène* garvev na c'hell tiñvañ nemet e diraez oksigen • *niveau de développement intellectuel* derez an diorreadur kefredel • *provoquer le développement d'un cancer* dec'han dinodadur ur c'hankr • *tumeur développée aux dépens du parenchyme d'une glande* yoc'henn evodet diouzh parenkim ur wagrenn • *tumeur développée dans le trajet d'une artère* yoc'henn diwanet war dreug un dalmerenn • *tumeur qui se développe dans la cavité endo-utérine* yoc'henn o tispakañ e-barzh kavenn ar grozh.

devenir

- *le devenir d'un médicament dans l'organisme* devoned ul lia er bevedeg.

déverser

- *conduits excréteurs du rein qui reçoivent les petits calices et se déversent dans le bassin* kanolioù degorzhañ al lounezh o tastum dever ar c'haliroù bihan hag ouzh e zinaouiñ el lestr.

déviation angulaire : épreuve de la ~, épreuve de la marche en étoile ◇ **Babinski-Weil test** ◇ **prouad g. ar monedone, prouad Babinski-Weil** Arnod evit lakaat war wel un direizh a 'n emgempouezañ (diwar un anaf en ilpenn pe er benvegad rakkambrel), anezhañ pediñ ar gouziviad, serret e zaoulagad, da vale dek kammed war raok, dek kammed war gil lies gwech diouzh renk; yaek eo ar prouad pa c'hoarvez da roud e gammedoù gwariañ ingal eus ur monedone d'egile.

déviacion de C1q ◇ **C1q deviation** ◇ **dastrann C1q** Dedalvout an dazgwered dastrann (pe lenañ) ar glokaenn war glask d'an hangaegemplezhioù amredat; ober a reer gant isrann C1q ar glokaenn, naoudiet gant an Iod 125.

déviacion conjuguee des yeux ◇ **conjugate deviation of the eyes** ◇ **gwariañ kevreet an daoulagad** Gwariañ a-untu an daoulagad, stadet dreist holl e koma al ledseizi diwar anaf gwazhiedel ledek (boukadur empenn muiek, gwadliñv, gwadveuzad ar c'hambroù); alies e noter ivez gwariadur ar penn war an hevelep tu (*gwariañ a-untu ar penn hag an daoulagad*).

dévi-

- *arrêt ou déviation de l'organogenèse* darniñ pe variañ an organbarañ, ehanbar (aneroubar) pe mibar • *déviacion de la cloison* gwariad an dilhenn, kammad an dilhenn • *déviacion des index du côté de la lésion* gwariañ ar biziad yod war-du an anaf • *déviacion du globe oculaire vers le haut* uswariañ ar voull lagad • *déviacions caractérielles* gwariadurioù neuzid • *la formule d'Arneth est déviée à gauche, à droite* kleizwariet, dehouwariet e vez luniad Arneth • *quand le pied est dévié vers l'intérieur, vers l'extérieur* pa vez gwariet an troad war ziabarzh, war ziavaez • *quatre variétés de pied bot suivant le sens de la déviacion* pevar seurtad troad potin hervez tu ar gammed.

dévirilisation ◇ **demasculinization** ◇ **dic'houvevekaat** Steuziñ an arouezioù gourevele.

dévitilisation ◇ **devitalization** ◇ **1 ezvevekaat 2 ezvevaat g.** 1 Distrujañ bouedenn an dant (enni ar gwazhied hag an nervenn). 2 Gant gwidoù kreuet ha marvennet ur gouli koll perzh en arc'hwelioù gwazhiedel ha navel ar bevedeg (sl. *excision, parage*).

dexaméthasone : épreuve ou test de la ~ ◇ **dexamethasone test** ◇ **prouad an deksametazon** Arnod amkanet da wiriñ amzalc'h ar gaenuslounezhenn ouzh ar c'hougorfenn : diounit a reer ur c'hortikosteroid, an deksametazon, a zo e wered diren borc'hadur ar c'haenwezher (ACTH), hag e tezvinter en troazh hormonoù ar gaenuslounezhenn (17-CS, 17-OH); ent reol e leia feur ar remañ, digemm e van pa vez ur yoc'henn en uslounezhenn hag ez a dreist reol pa vez usweek an uslounezhenn.

dextrocardie ◇ **dextrocardia** ◇ **dehouwariadur g. ar galon** Anvad genadel evit dilec'hiadurioù ar galon d'an hantervrusk dehou; kemm a lakaer etre 1) an *dehouwariadurioù arzeuat*, pa vez disvountet ar galon gant ur yoc'henn enbruskel, ur fennadur krezoù a-gleiz, pe pa vez desachet war zehou gant glenelloù krezoù, skleroz ar skevent pe al logigisvent; komz a reer eus *dehouladur* pa vez eeun an dilec'hiadur, eus *dehouc'hweladur* pa vez, ouzhpenn dilec'hiet ar galon, kemmet durc'hadur ar gern anezhi; 2) an *dehouwariadurioù ganedigel* m'emañ ar gern troet a-zehou, tri seurtad anezho : 2a) an dehouwariadurioù digevret hep tuginadur kavennañ ar galon (*dehouadroadur*), ar c'havennoù dehou (gwazhiennel) o chom a-zehou, loet a-dreñv ar c'havennoù kleiz (talmerel), 2b) an dehouwariadurioù digevret gant tuginadur ar c'havennoù (*situs inversus digevret*), ar c'havennoù gwazhiennel o vezañ a-gleiz ha dirak ar c'havennoù talmerel, 2c) an dehouwariadurioù gant tuginadur ar c'havennoù kalon hag an holl flugez (*situs inversus hollel*); peurliesañ e vez kevredet an dehouwariadurioù ganedigel gant kammneuziadoù ar galon, an eskern, h.a.

dextrocardiogramme ◇ **dextrocardiogram** ◇ **dehougalonwezañ** Rann eus ar c'halonvarrwezañ o tiskouez gwerederezh ar c'hofig dehou.

dextrogyre ◇ **dextrogyral** ◇ **1 ~dehoudreiñ 2 dehouc'hwelus** 1 A-zivout gwiennoù an nervennoù loc'hañ o treiñ an daoulagad a-gevre war zehou. 2 Perzh gant sukrennoù 'zo evel an D-glukoz da c'hwelañ a-zehou talenn al luc'h bleinekaet.

dextroversion ◇ **dextroversion** ◇ **dehoudreiñ** Fiñval kevreet a 'n daoulagad war zehou.

diabète ◇ **diabetes** ◇ **diabet g.** Anvad genadel un niver kleñvedoù diforc'h a zo boutin etrezo an daou azon, ar goursec'hed hag an ustroazh; arveret hep spizer, e talvez an termen kement ha diabet c'hwek.

diabète bronzé ◇ **bronzed diabetes** ◇ **diabet staenek** Klañvadur naouus dre ur melanoderma hollek, ur c'hirroz usteñvus gant sideroz hag un diabet c'hwek grevus gant akidoz; alies e stader ivez ur skorted enbore'hadel, bugelvanegzh eiltroüs, direizhoù ar c'henvelloù, an eskern, ar galon; riskl un dedro yud gant ar c'hirroz a laka war ar c'hleñved un erbedad tonkadel; furm glok an hemokromatoz kentael eo an diabet staenek (sl. *cirrhose bronzée, hémochromatose, sidérose hépatique*).

diabète des femmes à barbe ◇ **Achard-Thiers syndrome** ◇ **diabet ar merc'hed barvek, azoniad Achard-Thiers** Gant ar merc'hed, bezañs un diabet c'hwek hag ur c'hourblevegezh a c'hennad gourevel; sellet e vez evel ur furm leiek a c'hourevezgezh, a orin kaenuslounezhel.

diabète fruste ◇ **diabetes crude** ◇ **diabet kraï** Furm diazon diabet c'hwek a zinoer dre brouad ar glukozusvec'hiañ pe dre brouad ar c'hortizon-glukoz; stad a arouezer hiziv evel *angougemer ar glukoz* (sl. *intolérance au glucose*).

diabète hypophysaire ◇ **pituitary glycosuria** ◇ **diabet gougorfennien** Direizh kennevid ar glukid diwar usvorc'h an hormon kreskiñ.

diabète insipide ◇ **diabetes insipidus** ◇ **diabet heuz** Azoniad goursec'hed-ustroazh diwar divig darnel pe hollel an hormon eneptraosheiat (vazopresin) e dianlen un tizhad er rannbarzh treuzempenn-gougorfenn (yoc'henn, poread, daraez), direadus dre ziounit ar vazopresin (*diabet hedizh d'ar vazopresin*, Gl. *diabète pitresso-sensible*); diaes e vez dispartiañ an diabetoù heuz anafel diouzh an diabetoù heuz arc'hwelel dec'hant gant un diedvar hirbad (sl. *restriction hydrique : épreuve de ~*).

diabète insipide néphrogène héréditaire, diabète pitresso-résistant ◇ **nephrogenic diabetes insipidus, vasopressin-resistant diabetes** ◇ **diabet heuz lounezhien hêrezhel, diabet anhedizh d'ar vazopresin** Kleñved hêrezhel dibaot treuzkaset gwech er mod enkilek reveret, gwech er mod trec'hek aotozomek, lounezhad naouus dre ziwered ar vazopresin war ar pibelloù nezek, ar re-mañ o chom dre se dic'houest da zassugañ an dour; dedreñ a ra evel un diabet heuz kentrat, o tec'h an avat darvoudoù dourisvec'h grevus ha strafuilhoù a 'r c'hreskiñ.

diabète insulinodépendant, DID ◇ **insulin-dependent diabetes, IDDM** ◇ **diabet insulinrankus, DIR** Diabet c'hwek na c'hell bezañ prederiet nemet dre an insulin, anezhañ un diabet a rizh 1 peurliesañ; ur stad padek ha diwezhele eo an insulinrankusted, e kemm ouzh an insulinrekizusted.

diabète insulinorequérant ◇ **diabetes requiring insulin, diabetes insulin applicant** ◇ **diabet insulinrekizus** Diabet nad eo ket insulinrankus, a ranker koulskoude mezegañ dre an insulin da geñver un darvoud daskerzhat (ur poread da skouer).

diabète non insulinodépendant, DNID, diabète de type 2 ◇ **non insulindependent diabetes, NIDDM, type 2 diabetes** ◇ **diabet insulinanrankus, DIAR, diabet a rizh 2** Diabet c'hwek a brederier dre ar reol voued hag un enepdiabeteg genaouel.

diabète rénal ◇ **renal glycosuria** ◇ **diabet lounezhel, troazhc'hlukezegezh** Bezañs padek glukoz en troazh gant ur feur glukoz reol er gwad, e dianlen miarc'hwel ar pibelloù nezek a van hep dassugañ ar glukoz, gwariadenn hêrezhel treuzkaset er mod trec'hek gant ur werc'hennusted diglok.

diabète rénal phosphoglycudic, ostéoporose avec diabète rénal ◇ **phosphoglycudic renal diabetes** ◇ **diabet lounezhel fosfoglukidek** Klañvadur an oadour naouus dre an osteoporoz gant lauriou ha torroù, izilded ar c'higennoù, troazhc'hlukezegezh hep gwadusvec'h glukoz, isvec'h fosfor hag usvec'h fosfataz er gwad, a ve e dianlen andassug ar glukoz hag ar fosfatoù gant ar pibelloù nezek.

diabète stéroïde, diabète cortisonique ◇ **steroid diabetes** ◇ **diabet steroidel, diabet kortizonel** Diabet c'hwek devoudet gant ar vezañs reñverek er bevedeg eus hormonou kaenuslounezhel (11-oksikortikosteroidoù); un diabet leiek eo, harzuz ouzh an insulin, e dianlen un uc'harc'hwel kentael pe eilvedel d'un direizh a 'r c'hougorfenn (azoniad Cushing) pe c'hoazh un diounit kortizon pe ACTH.

diabète sucré ◇ **diabetes mellitus** ◇ **diabet c'hwek** Strafuill e kennevid ar glukid a-geñver gant un divig insulin pe gant un harzusted ouzh an insulin, o tevoudañ yoc'hadur ar glukoz er gwiadou; alies e vez kevredet direizhoù eus kennevid ar protid hag al lipid; ent klinikel, eo pennañ azon an diabet c'hwek ar gwadusvec'h glukoz war yun ha/pe goude pred (a-getep, dreist 7 hag 11, 1 mmol/l pe 1,26 ha 2 g/l hervez Aozadur Bed ar Yec'hed); hiziv e tiforc'h an destladur etrevroadel tri rizh diabet c'hwek : 1) an *diabet a rizh 1*, olinsulinel hag insulinrankus (DIR), a stader peurliesañ gant ar re yaouank (*diabet yaouerel, treut, krinus*); an arbenn anezhañ eo an anvorc'h insulin e dianlen an distruj gant unanantikorfou eus kelligoù β enezigoù Langerhans en ilgreiz, eleze dre berzh ur c'hleñved unhangaelel darvezet da heul ur poread viruzel; 2) an *diabet a rizh 2*, ar paotañ, o tizhout an oadour (diabet *oadourel, lart*), nad eo nag olinsulinel nag insulinrankus (DIAR); hag eñ borc'het reol, e vez an insulin kendouezet fall gant ar c'helligoù buzer; 3) aozerion 'zo a renk en ur *rizh 3* an diabetoù eilvedel (d'un ilgreizfo, da gleñved Cushing, d'an hemokromatoz, d'un diounit kortikoidoù, h.a.) hag azoniadoù hilel (sl. *antidiabétique, biguanide, coma diabétique, Cushing : maladie de ~, glycémie, glycosurie, hémochromatose, insuline, néphropathie diabétique, neuropathie diabétique*).

diabéide ◇ **diabetid** ◇ **diabetid g. -où** Anvad genadel an darvoudoù kroc'hen gant an diabetieon da heul distresadur ar stad hollek (gourheskedoù, breinged) pe diwar hegusted lec'hel ar borc'hadoù (dispuilhadoù ekzemavanek an organoù genel devoudet gant glukozegezh an troazh).

diabétique ◇ **diabetic** ◇ **1 diabetek aa. 2 diabeteg g. -eion 3 diabetien aa. 4 diabetel aa.** 1 Gant an diabet. 2 Gouziviad an diabet. 3 Devoudet gant an diabet. 4 A-zave d'an diabet.

diabétogène ◇ **diabetogenic** ◇ **diabeteiat aa.** O tevoudañ an diabet.

diabétogène : hormone ~, **hormone hyperglycémiant** ◇ **hyperglycemic hormone** ◇ **hormon g. diabeteiat, hormon glukozwadusvec'hius** Hormon ar rakgougorfenn n'eur ket deuet a-benn da c'houbarañ evit c'hoazh a ve oc'h enebñ ouzh gwered an insulin; un hormon all borc'h et gant an ilgreiz, ar glukagon, zo gantañ perzhioù glukozusvec'hiañ heñvel.

diabétologie ◇ **diabetology** ◇ **diabetouriezh** b. Studi an diabet hag ar prederiañ anezhañ.

diacnèse, diaknèse ◇ **diakinesis** ◇ **diakinez** g. Pempet ha diwezhañ pazenn eus kentañ profaz ar meioz.

diadococinésie ◇ **diadocokinesia** ◇ **dasfiñval** Gallout ren fiñvoù monedone herrek evel palvsaviñ-palvstouiñ a bep eil, ar c'hwel a vez strafuilhet er skleroz strewek hag e tizhadoù an ilpenn (sl. *adiadococinésie, cérébelleux : syndrome* ~).

diafiltration ◇ **diafiltration** ◇ **diafiltrañ** Araezad karzhañ ezlounezhel o c'hoarvezout eus an hemofiltrañ da heul dizolc'hiñ ar gwad dre an dileizhad bevedel.

diagnostic ◇ **diagnosis** ◇ **deznaou g., deznouañ** Hennadiñ ur c'hleñved dre zezren diwar an elfennoù pourchaset gant an imbouc'hioù klinikel hag amglinikel.

diagnostic anténatal, diagnostic prénatal ◇ **prenatal diagnosis** ◇ **deznaou rakganedel** Imbourc'h war ar rizehell pe ar grouell dre araezioù stenwaredel, bevoniell, gwadioniell war-benn dizoleñ kammneuziadoù.

diagnostic différentiel ◇ **differential diagnosis** ◇ **deznouañ digemmat** Dervaat deznaou ur c'hleñved dre zigemmañ e azonoù diouzh azonoù kleñvedoù all.

diagynique ◇ **diagynic** ◇ **trevenevel** aa. A-zivout treuzkas hêrezhel un namm pe ur c'hleñved o c'hoarvezout dre ar vamm hepken, houmañ o vezañ salv he unan ha lavaret *avoner*; un dro eo eus an hêrelezh eret ouzh ar rev, a-zalc'h ouzh gen loet war parzh ankevelep ar c'hromozom revel X (sl. *conducteur, diandrique, hémophilie*).

dialyse ◇ **dialysis** ◇ **dializ g., dializiñ** Araezad amkanet da gemmañ dasparzh ar molekul dileizhet e div liñvenn gevarall etrezo ur genenn handreuz; houmañ a gae ouzh ar c'hollidoù hag a lez ar c'hristalloïdoù da fuiñ adalek an dileizhenn ma emaint bec'hiekañ etrezek eben; arveret e vez seurt kalvezder dispartiañ en hentennoù karzhañ ezlounezhel.

dialyse intestinale, perfusion intestinale ◇ **intestinal dialysis** ◇ **dializiñ pervezel, trefennañ pervezel** Araezad karzhañ ezlounezhel amkanet da eztennañ an disveveladoù pistriek yoc'h et er gwad hag ar reñver dour dre ober dezho fuiñ a-dreuz da c'hlaourgen ar pervez : eroueriet e vez ar pervez eurvezhioù pad gant ul liñvenn un disterig usgrennek ebarzhet dre ur sont daouzegennel ha dastumet dre ur sont youlc'hel; dilezet eo an araezad-se hiziv.

dialyse péritonéale, hémodialyse intra-péritonéale ◇ **peritoneal dialysis** ◇ **dializiñ ampelennel** Araezad karzhañ ezlounezhel dre fuerezh an disveveladoù pistriek a-dreuz d'an ampelenn : eroueriañ a reer kavenn an ampelenn gant ul liñvenn un disterig usgrennek (sl. *autodialyse, hémodialyse*).

dialys-

- *non dialysable* andializadus.

diamématique ◇ **diameatal** ◇ **treuzode** g. Gwezhet a-dreuz d'un ode, sk. *ezwanañ treuzode kev ar garvan* (Gl. *ponction diamématique du sinus maxillaire*).

diandrie ◇ **diandry** ◇ **diandriezh** b. Seurtad triploidiezh ma 'z eo ar c'hromozom dreistniver a orin tadel.

diandrique, androphore ◇ **diandric** ◇ **trec'hourevel** aa. Seurtad hêrelezh eret ouzh ar rev er spesadoù loened ma 'z eo heterogametek ar pazed : treuzkaset e vez an arouezioù hêrezhel enkilek gant ar pared salv hag anadiñ a reont war ar pazed (sl. *diagynique*).

diapédèse ◇ **diapedesis** ◇ **tregenk** g. Emdizh al leukokit er-maez eus ar c'horrwazhied; dre loc'hoù amoebvanek e treuzont ar speurioù hag e teount da vezañ kelligoù emdizhat.

diapédèse

- *diapédèse leucocytaire* tregenk leukokit, gwenn-tregenk • *erythrodiapédèse* tregenk hemati, ruz-tregenk.

diaphragmatite, phrénite ◇ **diaphragmatitis** ◇ **kelc'hspourenn g.** Tanijenn ar gigenn gelc'hspourenn.

diaphragmatocèle, hernie diaphragmatique ◇ **diaphragmatic hernia** ◇ **kelc'hspourennogad g., avelenn b. gelc'hspourenn** Darn eus flugez ar c'hof oc'h ogañ dre ur boulc'h er gelc'hspourenn.

diaphragme, TA diaphragma ◇ **diaphragm** ◇ **kelc'hspourenn b.** Tilhenn gaherstirennec o tispartiañ kavennoù ar brusk hag ar c'hof, dezhi stumm ur volz div gouc'hell dehou ha kleiz ouzh he ober, enni igorennoù ma tremen peurgetket an aortenn, ar wazhienn gav izelañ, an treizher, anezhi pennañ kigenn an analañ.

diaphragme

- *imperforation de l'artère pulmonaire par fusion des trois valves sigmoïdes en un diaphragme fibreux* andigor eus kef ar skevent, an teir sac'hell, kempeget, o vont d'ober ur stiv stirek • *la cape cervicale et le diaphragme sont les deux préservatifs féminins classiques* ar stavelloù benevel klasel eo ar c'habell gouzoug hag an dlidenn • *perforations arrondies, ou pores, libres ou obstruées par un mince diaphragme* boulc'hennoù krenn, pe savnigoù, digor pe stanket gant ur stiv moan • *tumeur intrasellaire rompant le diaphragme de la selle turcique* yoc'henn ebarzh-dibr o fregañ kelc'hspourenn an dibr turkek.

diaphyse ◇ **diaphysis** ◇ **treuzenn** b. Korf un askorn hir, loet etre an div dalpenn.

diaphysectomie ◇ **diaphysectomy** ◇ **treuzennezvenañ** Dazbidañ un darn eus treuzenn un askorn hir.

- diapneusie** ◇ **diapneusia** ◇ **diapneuzia** g. Ozvenn genlennel dindan ur glaourgenn reol oget diwar dalbenn diabarzh ar voc'h pe diwar ribl an teod e-barzh ur boulc'h e gwareg an dent.
- diarrhée** ◇ **diarrhoea** ◇ **darc'hoal** g. -ioù, **darc'hoalañ** Ezvountañ oulennoù liñvel (sl. *amibiase, antidiarrhéique, balanti-diase, choléra, caélique* : *maladie* ~, *entérite couenneuse, sprue, tourista*).
- diarthrose**, TA **junctura synovialis** ◇ **diarthrosis** ◇ **koubl** g. **irgennek**, **kenvell** g. Arz heloc'h etre pennoù eskern goloet gant migorn, kevreet dre ur pourc'had kenvell ha stagelloù, etrezo ur gavenn pallennet gant irgenn.
- diarshisis** ◇ **diarshisis** ◇ **diaskiziz** g. Astal un arc'hwel dre span an nervlanv ouzh e araezañ.
- diastasis** ◇ **diastasis** ◇ **diastaziz** g. 1 Skar padek reol etre an talbennoù kenvellañ lodok e daou askorn kenroud evel skin ha spilhenn, gwerzhid ha helmo. 2 Skar ezreol etre daou dalbenn kenvellañ da heul un daraz peurliesañ, termen arveret dreist holl a-zivout ar c'henvell fer-gar (pe kenvell an ufern) 3 skar etre div gigenn eeun ar c'hof o tec'han ezvoulc'hadur speur a-raok ar c'hof.
- diastématomyélie, diplomyélie** ◇ **diastématomyelia** ◇ **melforc'hegezh** b. Dizoubladur ar mel a-livenn dindan ar pempet mellenn gein a-geñver gant ur c'hammeuziad a'r mellennoù, ezreolder kevret peurliesañ gant ar spina bifida, oc'h erzerc'hañ adalek bloavezhioù kentañ ar vuhez dre zireizhoù navel an izili traoñ ha strafuihoù ar pervez hag ar c'hwezbigell.
- diastème** ◇ **diastema** ◇ **diastema** g. Skar ezreol etre daou zant, peurliesañ ar rakdent kreiz krec'h.
- diastole** ◇ **diastole** ◇ **diastol** g. Lankad diargrezañ ar galon ha strummañ ar gwad; o tont da heul diastol ar c'hentezoù, e teraou diastol ar c'hofigoù gant serridigezh ar sac'helloù kornloarek aortek hag a-skevent ha padout a ra betek deroù ar sistol; a-geñver emañ gant an tav bras (sl. *bruits du cœur, systole*).
- diastol-**
- *allongement du temps diastolique* uspad an diastol
 - *bradydiastolie* uspad an diastol, diastoluspad
 - *pression diastolique* gwask diastolel
 - *frémissement diastolique* gougrid diastolel.
- diathermie** ◇ **diathermy** ◇ **trewrez** g., **trewrezañ** Arver ar redoù tredan uheldalm read bras evit sevel ar gwrezverk e diabarzh ar gwiadou.
- diathermo-coagulation** ◇ **diathermocoagulation** ◇ **trewrezkaouledañ** Dedalvout an trewrez da zistrur ar gwiadou.
- diatomées** ◇ **diatoms** ◇ **diatom** s. Korralg unkellig a c'hounez korvo ganto ar Vezekniezh lezennel evit gouzout hag ur c'helan zo hini un den beuzet : an diatom, gwarezet diouzh ar breinañ gant ur grogen silika, a emsil eus ar skevent d'an organoù all ma c'haller o dinoiñ pell amzer goude ar marv.
- dichotomie** ◇ **dichotomy** ◇ **divrannañ** 1 (Korfadurezh) daouhanteriñ un organ skoultrennat. 2 (Jedoniezh) mod arglask dre ar poellata daouredel. 3 (Gwir) kenlodañ andezvek briwerzhioù etre mezeion.
- dichromasie** ◇ **dichromasy** ◇ **daoulivwel** g. Stad ur gouziviad nad eo ket evit merzhout ouzhpenn daou liv (sl. *achromatopsie, deutéranopie, dyschromatopsie, protanopie, trichromasie*).
- dichromate** ◇ **dichromatic** ◇ **1 daoulivwelek** aa. **2 daoulivweleg** g. 1 Gant an daoulivwel. 2 Gouziviad an daoulivwel.
- diclonie** ◇ **myoclonia of upper or lower extremities** ◇ **treuzkrid** g. Kahegrid o tizhout an daou ezel krec'h pe an daou ezel traoñ.
- dicrote** : **onde** ~ ◇ **dicrotic wave** ◇ **gwagenn** b. **daoulamm** pe **dikrotek** Bos war linenn diskenn ur poulzwezd pe ur gwaskwezd talmerel, oc'h erzerc'haat disvann ar wagenn sistolel ouzh an trobarzh talmerel; pa deutaer ar poulz, ent vonan ne verzher ket an disvann; muiaat a ra hemañ avat gant an derzhienn hag ar biz a sant ur poulz daoulamm; komz a reer neuze eus *poulz dikrotek* hag eus *dikrotegezh*.
- Dide et Botcazo** : **syndrome de** ~ ◇ **Dide-Botcazo syndrome** ◇ **azoniad Dide-Botcazo** Azoniad oc'h erzerc'haat ur boukadur e tiriad div dalmerenn adreñv an empenn (tolbezennou kilpenn), o kevredañ un tizhad a'r gweled (dallentez abluskennek klok pe ledangwel daoudou gant trezerc'hiou gweleled ha nammandenaoud), andenaoud an amegor ha strafuilhoù ar c'hounerezh a rize azoniad Korsakoff.
- diduction** ◇ **diduction** ◇ **diledañ** Loc'hañ diadrezur ar c'haved.
- diélectrolyse** ◇ **dielectrolysis** ◇ **tregevionaat** Ebarzhiñ kevionennoù er bevedeg diwar-bouez ur red galvaniek.
- diencephale** ◇ **diencephalon** ◇ **treuzempenn** g. Parzh adreñv ar ragemenn (TA *prosencephalon*) o kevreañ ar c'hrennem-penn (TA *mesencephalon*) hag an hanterennoù empenn, en e greiz an trede kambr, anezhañ an derc'hvel, ar gouzerc'hvel hag an arzerc'hvel.
- diencephalite** ◇ **diencephalitis** ◇ **treuzempennfo** g. Tanijenn an treuzempenn.
- diencephalopathie** ◇ **diencephalopathy** ◇ **treuzempennanaez** g. Klañvadur an treuzempenn.
- 1 diète, régime 2 régime 3 diète** ◇ **1 diet 2 diet, regimen** ◇ **1 hanren** g. **emvevañ, hanren 2 hanren, reol** b. **voued 3 diouer** g. **boued** 1 Doare emvagañ reizh diouzh ezhommoù ar bevedeg yac'h pe diouzh amplegadoù ar yac'haat anezhañ pa vez klañv. 2 Doare emvagañ desavelet en un amboaz lavaret : *hanren dourel* (Gl. *diète hydrique*), reol voued direet d'an euviñ dour hepken; *hanren laezhel* (Gl. *diète lactée*), reol voued ma teveter al laezhadoù; *hanren druz* (Gl. *diète cétoène*), reol voued ma fonner an druzennoù; *hanren iskaloriel* (Gl. *régime à basses calories*), h.a. 3 (Kemeradur deuet dre rikladur ster) tremen hep boued, hanren dourel.

diététicien ◇ **dietician, dietist** ◇ **bouedour g. -ion** Arbennigour war ar Vouedouriezh; hervez anvadurezh *Amaezh etrevroadel al Labour (Office international du Travail)*, ar vouedourion zo kalvezourion, ar vezeion arbennigour war an emvagañ o vezañ anvet *mezhurourion* (Gl. *nutritionnistes*).

diététique ◇ **dietetic** ◇ **1 bouedourel aa. 2 bouedouriek aa. 3 Bouedouriezh b.** 1 A-zave d'ar Vouedouriezh. 2 O kemplegañ da erverkadoù ar Vouedouriezh. 3 Diskiblezh a zo he fal studiañ ar boued e-keñver e weredoù war ar yec'hed ha, da heul, savelañ reolennoù an emvagañ.

diét-

• *aliment diététique* boued hanren • *cure hygiénodiététique* kur yec'hedel-mezhurel • *diétothérapeute* hanrengourour • *mesures diététiques* diarbennoù mezhurel.

différenciation ◇ **differentiation** ◇ **diforc'hekaat** (Gwadouriezh) emdreñ adalek ar bongelligoù betek ar c'helligoù azv, anezhañ div bazenn : 1) an *desavelañ* o tegouezhout gant diaraogerioù spesadel pep ac'had, 2) an *azviñ*, ma tinod proteinoù spesadel an ac'hadoù.

différenciation : **classes d'antigènes de ~, CD** ◇ **cluster of differentiation, CD** ◇ **rummoù antigenoù diforc'hekaat, spletao g. diforc'hekaat, CD** Destladur etrevroadel an antigenoù diforc'hekaat pe merkerioù a-gennenn; ar re-mañ, bennozh da antikorfoù unskodien, a dalvez da hennadiñ an elfennoù luniek eus ar gwad emaint lenet ouzh ar gorre anezho; e se, ar rummoù CD 1 da CD 8 a ra dinoñ al limfokit T, CD 19 da CD 24 al limfokit B, CD 14 ar monokit, CD 15 ar granulokit, CD 11 da CD 13 ar monokit hag ar granulokit.

diffluent ◇ **1 diffluent 2 discursive** ◇ **1 liñvennek aa. 2 amberus aa.** 1 A-zivout gwiadoù aet ken blot ma hañvalont bezañ liñvel. 2 A-zivout prepozioù na gaver poell ebet a rofe unded d'ar redad anezho.

diffusion : **facteurs de ~, facteurs de Duran-Reynals** ◇ **spreading factors, diffusion factors** ◇ **parennoù l. (b.) deskignañ, deskignerioù l. (g.)** Danvezennoù (enzimoù evel an hialuronidaz) o vuiaat skignusted ar viruzoù, an toksinoù hag al livuzennoù ebarzh ar gwiadoù; bezant int e klidennoù hag en organoù all loened 'zo, e garvevion 'zo hag en aozadoù bevedel 'zo (binimoù).

diffusion alvéolo-capillaire ◇ **alveolar capillary diffusion** ◇ **fuiñ logigoùkorrwazhied** Tremen an aezhennoù enanalet eus al logigoù skevent d'ar c'horrwazhied; ar *barr fuiñ skeventel, DL* (Gl. *capacité de diffusion pulmonaire*) eo an ec'honad eus un aezhenn lavaret o treuziñ ar gennenn logigoù-korrwazhied e-doug ur munud evit un diri gwask darnel 1 torr; evit an oksigen emañ ar barr fuiñ skeventel (DLO_2) etre 25 da 35 mL/min/torr, hag evit an dioksidenn garbon ($DLCO_2$) ugent gwech brasoc'h (sl. *blocc alvéolo-capillaire*).

diffus(-)

• *amœbicides diffusibles, non diffusibles* amoebazherioù skignus, anskignus • *baisse de la diffusion alvéolo-capillaire* isfu logigoù-korrwazhied • *cholangite diffuse non oblitérante* bestforzhfo strewek anstevius • *capacité de diffusion pulmonaire* barr fuiñ skeventel • *coefficient de réflexion diffuse* gwezhiaer disvannañ amstrewat • *colorant diffusant rapidement* livuzenn o skignañ buan • *décalfication généralisée, localisée ou diffuse* dirazekaat hollek, lec'hiek pe strewek • *douleurs diffuses* laurioù strewek, laurioù dispislec'h • *empêcher la diffusion de l'oxygène des alvéoles pulmonaires vers les capillaires* parraat ouzh an oksigen a fuiñ eus al logigoù skevent d'ar c'horrwazhied • *hémorragies viscérales diffuses* gwadliñvoù strewek er flugez • *hyperplasie diffuse de l'épithélium thyroïdien* uswew strewek epitelienn ar skoedenn • *la tendance du cancer à diffuser dans l'organisme* an doug gant ar c'hankar da skignañ dre ar bevedeg • *le coefficient de perméabilité dépend de la diffusibilité de la molécule* emañ ar gwezhiaer hedreuzded e dalc'h skignusted ar molekul • *luminance d'un diffuseur parfait* sked un amstrewer dec'hiek • *photon absorbé ou diffusé* fotonenn luget pe amstrewet.

digestibilité ◇ **digestibility** ◇ **koazhadusted b.** A-zivout ur boued, keñver ar c'hementad bevelaet ouzh ar c'hementad euvret.

digestion ◇ **digestion** ◇ **koazhañ** Treuzfurmiñ dre weredoù fizikel ha kimiek ar bouedoù euvret evit ober anezho danvez beveladus gant ar bevedeg (sl. *anabolisme, assimilation, catabolisme, ingestion*).

digest-

• *ataraxie digestive* hezoni goazhadel • *atteintes digestives* tizhadoù koazhadel • *bol digestif* kir koazhadel • *clamp digestif* klamp koazhadel • *digérer* koazhañ • *digestion buccale et stomacale* koazhañ genaouel ha kreuzel • *graisses de la digestion* druzennoù ar c'hoazhadur • *manifestations digestives* erzerc'hadoù koazhadel • *médecine de l'appareil digestif, gastroentérologie* koazhadouriezh • *produit de la digestion incomplète des protéines* disoc'h diwar goazhadur diglok ar proteinoù • *tractus digestif* stirad ar c'hoazh-hañ • *troubles digestifs* strafuilhoù koazhadel • *ulcère digestif* angreizh koazhadel.

digitale ◇ **digitalis, foxglove** ◇ **brulu s.** Genad plant boutin en Europa a zouhenner anezho kalonusreerioù, ar glukozidoù diglatalek; el Liaouriezh e vez korvoet daou spesad anezho : *Digitalis purpurea* a denner anezhi an *digitoksin* ha *Digitalis lanata* o pourchas an *digoksin* ha *lanatozidoù* (sl. *cardiotonique*).

digitiforme : **impressions ou empreintes ~s** ◇ **digital** or **convolutional markings, digital impression** ◇ **troennlouc'h-adoù l. (g.)** Pukadennoù e lavnenn diabarzh ar volzpenn a-geñver gant troennoù an empenn hag an ilpenn, e dianlen ar c'hloppenn-issvoll, an empennfoeñ pe an uswask enkloupenel.

digynie ◇ **digyny** ◇ **diginiezh b.** Seurtad triploidiezh ma 'z eo ar c'hromozom dreistniver a orin mammel.

dilacér-

• *instrument utilisé en chirurgie pour sectionner; exciser (un fragment d'organe, une plaie), dilacérer les parties molles* benveg arveret er surjianerezh evit skejañ, gouvenañ (un darn organ), amnaziñ (ur gouli), dasfregañ ar parzhioù meizh.

dilatation des bronches, bronchectasie ◇ **bronchiectasis** ◇ **usvoll g. bronkez, bronkezusvoll g.** Muiadur kavnez ar bronkez, a-wechoù ingal (*usvoll kranennek*), a-wechoù e rezh un heuliad bolc'hadennoù (*usvoll bolbosek*), a-wechoù o sezañ e dibenn ar bronkez (*usvoll bazhoulek*), kevret gant distruj kebradur kaherstrek ar bronkez ha devoudus d'ur bronkezver henek.

dilatation aiguë de l'estomac ◇ **acute gastric dila(ta)tion** ◇ **usvoll lemm ar c'hreuz, kreuzusvoll g. lemm** Dardennadur muiek ar stomok gant azonoù antreizh pervez, o tarvezout a-wechoù goude an oberatadennoù war ar c'hof, a zispleger evel dianlen da amwask an daouzegenn gant gwrizienn ar gandedenn.

dilatation de l'estomac, gastrectasie ◇ **dila(ta)tion of the stomach** ◇ **usvoll ar c'hreuz, kreuzusvoll** Muiadur endalc'h ar stomok e dianlen laoskted e gigennoù pe isvoll ar porzhier.

dilatation thérapeutique ◇ **dilatation** ◇ **frankaat** Prederiañ ar c'hanolioù hag ar c'havennoù a venner o assav pe vuiaat o c'havnez : *frankaat san an daeroù, frankaat un dalmerenn* (sl. **angioplastie**), *frankaat ur gwask kalon* (sl. **Brock : opération de ~, commisurotomie**).

dilat-

• *allongement et dilatation anormaux* ushed hag usvoll • *colpectasie, dilatation anormale du vagin* gouinusvoll, frankted ezreol ar gouin • *dilatation à l'origine de l'artère carotide interne* frankaenn e deroù ar garotidenn diabarzh • *dilatation bronchique localisée* bolc'hadenn lec'hiek war ur vronkezenn • *dilatation et prolifération anarchique d'un ou plusieurs troncs artériels ou veineux* bolc'hadur ha neradur antrevn un pe lies kef talmerel pe wazhiennel • *instrument filiforme pour explorer ou dilater un conduit naturel* benveg neudheñvel evit erc'hwiliañ pe frankaat ur ganol naturel • *introduire à travers la paroi de l'infundibulum du ventricule droit des valvulotomes de tailles croissantes, puis un dilateur* sankañ adreuz da speur founilh ar c'hofig dehou trapigenbenerioù a ventoù war gresk ha, da c'houde, ur frankaer • *muscle dilateur de l'iris* kigenn frankaer ar mab lagad • *muscle dilateur des narines* kigenn frankaer an divfron • *segment initial dilaté et non accolé du cõlon droit* rann deroù ar c'holon dehou, frankaennek ha diliver • *tumeur développée sur le trajet d'une artère par dilatation de ses parois* yoc'henn diwanet war dreug un dalmerenn dre volc'hadur he speurioù.

dilution : courbe de ~ ◇ **indikator dilution curve** ◇ **krommenn b. dizolc'hiñ** Kevregad diwar lerc'hwezañ en ur poent eus ar wazhiadurezh (talmerenn drobarzhel, kavenn galon) an argemmadoù a-gevreizh d'an amzer eus bec'h un danvezenn ensinklet en amred (livuzenn, skinizotop, h. a.) pe dewentet (hidrogen); gant neuz ar grommenn e sav ditour eus ec'honad ar gwad, ec'hongas ar galon, herr an amred, bezañs ur skoev, h. a.

dilu-

• *analyse par dilution isotopique* elfennerezh dre danaviñ izotopek • *hyponatémie de dilution provoquée par l'absorption massive de bière* gwadisek'h natriom e dianlen an dizolc'hiñ devoudet gant euvriñ bier a-fonn • *suspension colloïde très diluée* arluggenn golloidel tanav kenan.

dimension

• *augmentation des dimensions du cœur* kalonusvent • *équation aux dimensions* atalad mentawouriel • *perte de la vision portant sur une zone du champ visuel de petites dimensions* tachenn dallder bihanvent.

dimère ◇ **dimer** ◇ **dimer g.** Polimer div elfenn (*monomer*) ouzh e ober; *homodimer* a reer anezhañ pa vez unrezh an div elfenn, *heterodimer* pa vezont allrezh; an *D-dimer* zo un aozad spesadel diwar zispenn ar fibrin : test eo e vezañs er plasma eus un trombuz e stad ar fibrinloezañ.

dimérisation, hérédité bifactorielle ou **digénique** ou **dimérique** ◇ **heredity twofactor** ◇ **hèrelezh b. divbarenn** Hèrelezh ma vez desavelet pep hini eus an arouezioù bonan pe gleñvedel dre wered unvan div c'henenn drec'hek pe daou goublad genennoù enkilek (sl. *polymérie*).

dimidié ◇ ◇ **hanterennek aa.** A-geñver gant un hanterenn, dehou pe gleiz, eus ar c'horf, sk. *aneraez hanterennek* (Gl. *anesthésie dimidiée*).

dimin-

• *augmenter ou diminuer la respiration* muiaat pe leiaat an analerezh • *diminuer l'acidité gastrique* leiaat trenkegezh ar stomok • *diminuer l'excitabilité* leiaat ar vroudadusted • *diminution de la motilité et de la durée de la motilité des spermatozoïdes* istead hag ispad fiñval ar spergelligoù • *diminution de l'activité d'une source radioactive* leiaadur skinoberiegezh ur vammenn • *diminution des immunoglobulines sériques* gwadisek'h an immunoglobulinoù gwadveizel • *diminution ou arrêt du débit biliaire* leiaadur ar sav ar red bestl • *diminution permanente du calibre de l'orifice pulmonaire* leiaadur padek kavnez ar gwask askevent.

dimorphisme ◇ **dimorphism** ◇ **divneuziadezh b.** 1 Stad un hanwe o kevredañ daou neuziadur, sk. ar sinovialomou ma kenvez furmadurioù epitelal ha kenglenel. 2 A-zivout bevedegoù evel ar foue, o wiskañ ur furn pe unan all hervez an amveziadoù. 3 *Divneuziadezh revel* eo perzh ar spesadoù a zo dezho pep a neuziadur hervez ar rev.

dip ◇ **dip** ◇ **dip g.** Puk berr deroù-diaistol war grommennoù gwask ar c'hentez hag ar c'hofig lerc'hwezet diwar-bouez ur c'hateter; heuliet eo gant un adsav trumm hag ur gwastad dibenn-diaistol (tresad a stumm *puksav-gwastad* pe *gavr* : √) betek ar sav sistolel; arvez stadet er stadoù adiaistol, alies e-kerz an amgalonennfo henek strishaus.

dipeptidase ◇ **dipeptidase** ◇ **dipeptidaz** g. Enzim, kedrann an erepsin, borc'het gant glaourgenn ar pervez, e wered ec'haozañ an dipeptidoù.

dipeptide ◇ **dipeptide** ◇ **dipeptid** g. Peptid div amindrenkenn ouzh e ober.

diphasique ◇ **diphasic** ◇ **daoulankad** aa., **daoulankadek** aa. A-zivout nep ergorenn alvezel pe vevedel o trediñ hervez daou brantad pebeilat; er Vevoniezh ez arloer an termen ouzh al loened emdizhat rannet o hoali etre prantadoù gouennañ ha prantadoù mezhr.

diphétérie ◇ **diphtheria** ◇ **difteriezh** b. Pistriboread tredizhus naouus dre vrizhliennoù fibrinek o furmiñ war glaourgennoù ar c'harloc'henn hag ar c'hargadenn, bezant enno a-fonn bazhell Loeffler (*Corynebacterium diphtheriae*) borc'her un toksin dec'hanus da anadennoù a bistriadur hollek (seizioù, lounezho, kalongaherfo); e Frañs ez eo endalc'hek ken diskleriadur ar c'hleñved, ken an ergurañ anezhañ dre ar vaksinerezh (sl. *croup, Marfan : syndrome malin secondaire de ~, Grenet et Mézard : syndrome malin tardif de ~, vaccin antidiphérique*).

diphérique ◇ **diphtheric** ◇ **1 difterek** aa. **2 diftereg** g. **-eion 3 difterek** aa. 1 Gant an difteriezh. 2 Gouziviad an difteriezh. 3 A-zave d'an difteriezh.

diplacousie, paracousie double ◇ **diplacosis** ◇ **kammglev** g. **daouek, daouglev** g. Strafulilh ar c'hleved, an divskouarn oc'h eraezñ pep a uc'hder pe ur skouarn daou uc'hder d'an un son.

diplegie ◇ **diplegia** ◇ **daouseizi** g. Seizi daoudu o tizhout rannoù kemparzhiek bras pe vrasoc'h eus ar c'horf, bezant e taolenn glinikel kleñvedoù diseurt : *daouseizi empennel familhel*, naouus dre un treuzseizi dasstrizhek ha strafuilhoù al lavar, *daouseizi empennel mabanel*, anezhañ ul ledseizi daoudu dargrezañ pe un treuzseizi dasstrizhek (kleñved Little), *daouseizi an dremm*, h.a.

diplo X ◇ **diplo X** ◇ **diplo X** Kariotip benevel reol naouus dre ar vezañs eus daou gromozom revel X (gonozomoù) bonan.

diplobacille ◇ **diplobacillus** ◇ **diplobazhell** b. Garvev dezhañ stumm div vazhig kempag.

diploé ◇ **diploe** ◇ **diploe** g. Steuñvenn spoueek loet etre an div lavnenn stank, diabarzh ha diavaez, eus ar c'hloppenn.

diploïde, diplo ◇ **diploid** ◇ **diploïdel** aa. A-zivout kelligoù ar *soma*, enno niver reol ar c'hromozomoù, eleze en den 22 zaouad kromozomoù somatek pe *aotozomoù* ha 2 gromozom revel pe *gonozomoù* (sl. *caryotype, chromosome*).

diploïdie ◇ **diploïdy** ◇ **diploïdiezh** b. Stad ur gellig pe un hinienn diploïdel.

diplophonie, voix bitonale ◇ **diplophonia** ◇ **mouezh daoudon, daoulez** g. Strafulilh er mouezhparañ, daou son kevarall o furmiñ a-ser er c'harloc'henn, e dianlen pe 1) ur seizi untu, an daou bleg mouezh stennet dizingal oc'h ec'hodiñ pep a son, pe 2) ur polip bihan o tivranñañ faout an tarzh, pep rann o tont ganti ur son a uc'hder diforc'h.

diplophonique ◇ **diplophonic** ◇ **1 daouleziek** aa. **2 daoulezel** aa. 1 Gant an daoulez. 2 A-zave d'an daoulez.

diplopie ◇ **diplopia** ◇ **kammwel** g. **daouek, daouwel** g. Strafulilh ar gweled, an daoulagad oc'h eraezñ pep a skeudenn pe ul lagad div skeudenn eus an un ergorenn.

dipper ◇ **dipper** ◇ **puker** g. **-ion** Gouzrec'h a c'houziz e wash gwad en noz; ar re na c'hoarvez ket an anadenn-se ganto a reer anezho *anpukerion* (Sz. non dippers) (sl. *MAPA*).

dipsogène ◇ **1 dipsogenic 2 dipsogen** ◇ **1 sec'heteiat** aa. **2 sec'heteiad** g. **-où** 1 O tec'han sec'hed. 2 Danvezenn sec'heteiat.

dipsomane, dipsomaniaque ◇ **dipsomaniac** ◇ **1 mezvariat 2 mezvariad** g. **-ed** 1 Gant ar mezvar. 2 Gouziviad ar mezvar.

dipsomanie ◇ **dipsomania** ◇ **mezvar** g. Darlusk da euvriñ a-fonn liñvennoù pistriek, alkoolek peurliesañ. "Ar vezvierion a lonk p'o devez tro, ar vezvariaded bewech ma krog o barrad" (Trélat).

dipsomaniaque ◇ **dipsomaniac** ◇ **1 2 sl. dipsomane 3 mezvarel** aa. 1 Gant ar mezvar. 2 Gouziviad ar mezvar. 3 A-zave d'ar mezvar.

direct- / dirig-

• *bilirubine conjuguée ou directe* bilirubin keveilet pe eun • *bilirubine libre, non conjuguée ou indirecte* bilirubin ankeveil pe ameeun • *dans l'électrolyse les anions se dirigent vers l'anode, les cations vers la cathode* e-kerz an tredanrannañ e lusk an anion etrezek an anod, ar c'hation etrezek ar c'hatod • *étude directe du malade* studi rageeun ar glañvourion • *rayon directeur* skin stur.

discal ◇ **discal** ◇ **diskel** aa. A-zave d'un disk etre-melloù.

discal : hernie ~e, hernie du disque intervérbral, hernie méniscale ◇ **intervertebral disk hernia** ◇ **ogad** g. **an disk etre-melloù, diskogad** g. Balir an disk etre-melloù e-barzh kanol ar mellkein diwar gilezvoutad ar gronn bouedennek da heul un daraez; sezañ a ra an ogad war an disk L4L5 peurliesañ, war an disk L5-S1 a-wechoù, oc'h amwaskañ gwriziennoù an nervenn a-goazez hag o tevoudañ un nervost kriz ha dalc'hus; pa na giz ket an amwash ha pa zarvez ar seizi e ranker oberata ha lemel ar gronn ogat.

discarthrose ◇ **discarthrosis** ◇ **diskartroz** g. Seurtad remm henek dic'henezhadel a 'r melloù, naouus war ar skinlunoù a letu dre enkaat an esaouenn diskel, douezeakaat gwastadoù ar c'horfoù mellenn kefin ha furmiñ askorndeñvennoù.

discite ◇ **discitis** ◇ **diskifo** g. Tanijenn un disk etre-melloù.

disciplin-

- *discipline médicale* diskiblezh vezegel • *discipline reconnue par l'Ordre des médecins* diskiblezh angemeret gant Urzh ar vezeion
- *enseignement pluridisciplinaire* kelenn liesdiskiblezhel • *recherches interdisciplinaires* imbourc'h etrediskiblezhel.

discographie ◇ **discography** ◇ **diskluniñ** Skinluniñ gronn bouedennek an disk etre-melloù goude ensinklañ ennañ ul liñvenn demer ouzh ar skinoù X.

discomycose ◇ **discomycosis** ◇ **diskomikoz** g. Kleñved devoudet gant foue eus ar genad *Discomyces*, naouus dre bugnezoù niverus o tedeññ henek.

discopathie ◇ **discopathy** ◇ **diskanaez** Klañvadur an disk etre-melloù.

discordance ◇ **discordance** ◇ **disklot** g., **disklotañ** Stad vred deskrevet gant Chaslin e 1912 : “ambren yen dislenadek, aneroug, realoù iskis, peurangwerc'h ar reiz, malouen, hep displeberadur kefredel”; e 1911 e oa bet deskrevet an un azoniad gant Bleuler dindan an anvadoù *Spaltung* (*disfaout*) ha *Schizophrenie*, an termen-mañ o kemer lec'h *dementia praecox* (*envedi gentrat*) kenradet gant Kraepelin er bloavezhioù 1890; hiziv e vez arveret da heñvelster an termenou *disklot*, *distroll ar me* (*Dissoziation*, *splitting of the Ego*, *dissociation du moi*), *disfaout* (*Spaltung*, *Ichspaltung*, *clivage*, *désagrégation*) ha *skizofreniezh*.

discret ◇ **discrete** ◇ **1 arskarek** aa. **2 diheverzh** aa., **dihewel** aa., **leiek** aa. 1 A-zivout un dispuilhad, rouez e elfennoù, sk. : *afoù arskarek*. 2 A-zivout un azon, a-vec'h diverzhet, sk. : *divigad loc'hadel diheverzh*, *kleizenn dihewel*, *skorted vintrek leiek*.

discriminatif : **système** ~, **néosensibilité** ◇ **gnostic sensibility** ◇ **haeziñ skaradel** Anvad genadel ar modoù haeziñ a-geñver gant ar merzhout deznadel : *stekññ spis* pe *skaradel* (Gl. *tact épique*), *gweled skaradel* (dre vrizhenn al luc'hsae), h.a.

disonction ◇ **disonction** ◇ **disglenañ** Dispartì etre daou askorn pe daou organ kenstag.

disonction épiphysaire, décollement épiphysaire ◇ **separation of the epiphysis** ◇ **disglenañ an dalpenn** Anaf daraezel an eskern hir o tarvezout gant ar vugale, anezhañ dispartì ar bloc'h migorn talpennel gant ar vabaned ha, gant ar re vrasañ, un torr etre an dreuzenn hag ar migorn kreskiñ.

disloc-

- *dislocation de la pince astragalienne par fracture* diempradur gevel an ufern dre un torr.

disomie ◇ **disomy** ◇ **dizomiezh** b. Bezañs (reol) daouadoù kromozomoù ; anv a reer eus *dizomiezh unganerel* azivout daouadoù kromozomoù o tont eus an tad pe eus ar vamm.

dispensaire ◇ **dispensary, health center** ◇ **prederva** g. Diazevadur prevez pe foran ennañ gwele klañvdiañ ebet, ma pour-chaser prederioù mezegel kurañ pe ergurañ pe ur skorañ gwaredvezegel ; ouzhpenn ar *predervaoù hollek* pe *liesdiskiblezhel* ez eus reoù arbennik : *predervaoù ar yec'hed bred*, *predervaoù diournat an HAZA*, h.a.

dispensaire de soins, centre de soins ◇ **treatment center** ◇ **arouelva** g. Kurdi ma vez pourchaset arouelioù klañvdiour, war al lec'h pe dre vont da di ar c'houziviaded.

dispos-

• *appareil, dispositif* stignadell, trevnad • *attitude bienveillante, disposition à la bienveillance* tuedigezh vadelezhus • *circuit ventilatoire disposé pour une réinspiration* amred gwenañ trevnet evit un adenanalañ • *deux filaments disposés parallèlement* div edañvenn stallet kenstur • *dispositif couplant un microscope et une lampe à fente* trevnad o kevreañ ur c'horgresker hag ur skarrlamp • *dispositif intra-utérin* stignadell enkrozhel • *dispositif permettant l'étude du champ visuel* trevnad arveret da studiañ ar gwelvaez • *granules disposés de façon linéaire* greunanou stallet alinenn • *les dispositions de l'affectivité et de l'intellect* tuedoù ar gantaezelezh hag ar gefredelezh • *prédisposition génétique* kenttuadur hilel • *prédisposition héréditaire* raktued hêrezhel • *terrain héréditaire prédisposant au cancer* goudrevn hêrezhel o kenttuañ d'an hanweoù • *tissu disposé sous forme de membranes minces* gwriad stallet e rezh lavnennoù moan.

dissection ◇ **dissection** ◇ **diskejañ** Rannañ an elfennoù a ya d'ober un organ pe an organoù a ya d'ober ur parzh eus ar c'horf, renet e-kerz ur gwezh surjanel pe da geñver ur c'helanskejañ (sl. *nécropisie*).

dissection aortique, anévrisme disséquant de l'aorte, hématome disséquant de l'aorte, médianécrose aortique ◇ **dissecting aneurysm of the aorta, aortic dissection** ◇ **enrec'h** g. **an aortenn, darvoll** g. **enrec'hus an aortenn, gwatoññ** g. **enrec'hus an aortenn** Disfaout krennsae an aortenn astennet a-wechoù d'an trogelc'h anezhi hag alies war he hed a-bezh ; war zardenn emañ ar gavenn gant gwad ensilet dre ur rogadenn loet a-us da sac'helloù kornloarek an aortenn ; arbenn an enrec'h eo anafoù dic'henezhadel ar grennsae gant distruj ar gwiennou kaherel ha dastennek ; ent klinikel, ez erzerc'h trumm an enrec'h dre un daolenn heñvel a-walc'h ouzh himi an angwazhiad gant ul laur garv saezhennus etre skoaz ha mellkein ; ma ne vez ket oberataet diouzhtu ez eo marvus dindan un nebeut devezhioù en 80 % eus an degouezhioù dre fregadur en amgalonenn, er poullkreiz, er c'hrezoù pe er c'hof.

dissect-, disséqu-

- *anévrisme disséquant* darvoll enrec'hus • *dissection de la carotide* enrec'h ar garotidenn • *dissection du pédicule pulmonaire* diskejañ gwrizienn ar skevent.

disséminé

- *choroïdite disséminée* tolgennsaefo eskantet • *coagulation intravasculaire disséminée* kaouledañ engwazhiadel strewek • *eczéma*

aigu disséminé daroued lemm strewek • *ensemble disséminé de lésions ischémiques* strewad anafoù heskwadel • *lupus érythémateux disséminé* lupuz eritematus strewek.

dissimulation ♦ **concealment** ♦ **darguzhañ** Tevel war un darvoud pe ur stad a draoù war-benn touellañ; bredanaezel e vez realoù darguzhañ 'zo (sl. *réticence*).

dissociation albumino-cytologique du liquide céphalorachidien ♦ **albuminocytologic dissociation of the spinal fluid** ♦ **digevedriñ albumin-kelligoù al liñvenn benn-kein** Kevreted usvec'h bras an albumin ha feur (dam)reol ar c'helligoù el liñvenn benn-kein, stadet en empennfo darreuziat, ar yoc'hennoù empenn, amwask ar mel a-livenn, al liesgwriennfo, erzerc'hadouñ nerval ar velitokokiezh.

dissociation atrioventriculaire ou auriculoventriculaire ♦ **atrioventricular dissociation** ♦ **distroll g. kentez-kofig** Gwe-rederezh kendizalc'h ar c'hentezoù hag ar c'hofigoù, peurliesañ diwar ur mire : ar poulz gorrek pad eo pe *kleñved an distroll* da heul un tolc'had kentez-kofig klok; peurliesañ e talc'her an termen evit an degouezhioù ma lamm ar c'hofigoù buanoc'h eget ar c'hentezoù.

dissociation électromécanique ♦ **electromechanical dissociation** ♦ **distroll tredanel-treloc'hel** Anargrez ar c'hafer kalon daoust d'ur c'halonvarrwezd reol, o tarvezout goude un tredansak diounezet evit digrehadiñ; dizañjer pa dizh ar c'hentezoù, e tevoud en eneb un astal amred grevus pa lez diwered ar c'hofigoù; ar wikefre anezhañ a ve ur strafuilh e treizh an ion Ca⁺⁺ dre ionganoù kelligoù ar c'hafer kalon; stadet e vez ivez da geñver freg ar c'hofig o rouestlañ un angwaziad.

dissoc-

- *anticorps se combinant à l'antigène et se dissociant facilement* antikorfoù o kediañ ouzh an antigenoù hag o tigeriañ didenn
- *coefficient de dissociation (degré d'ionisation d'une solution)* kevionder
- *courbe de dissociation de l'oxyhémoglobine* krommenn digediañ an oksihemoglobin
- *degré de dissociation des bases dans l'eau* • derez ec'haozañ ar bazennoù en dour
- *quand les contractions du ventricule sont complètement dissociées de celles de l'atrium* pa vez peurzalc'h ar grezadoù ar c'hofig diouzh re ar c'hentez
- *termes employés comme synonymes : discordance, dissociation du moi, clivage, schizophrénie* termenou arveret da heñvelster : disklot, distroll ar me, disfaout, skizofreniezh.

dissol-, dissou-

- *concentration d'un corps dissous* bec'h ur c'horf war zileizh
- *dissolution brutale du tonus de posture* steuz trumm an tant diaboz
- *dissolution de la conscience* loezadur ar genskiant
- *médicament capable de dissoudre certains calculs biliaires* lia en araez da zileizhiñ grouan bestlel 'zo
- *résultant de l'action dissolvante de l'alcool* diwar wered dileizhiñ an alkool.

distal ♦ **distal** ♦ **peltek** aa. Ent glennadel a-zivout parzhioù an izili, an organoù, h.a., ar pellañ diouzh an orin, ar wrizienn, an dalenn dave (sl. *proximal*).

dista-

- *à distance du cuir chevelu* a-bell diouzh ar brigenn
- *amyotrophie distale* kaheisteñv peltek
- *distance séparant les deux acromions* regad etre an div gerskoaz
- *invagination de la partie distale de la tige du cheveu dans la partie proximale* emouinadur lodenn bellek garenn ar blev e-barzh al lodenn nezek
- *la phalange distale* an oefs peltek
- *lambeau cutané prélevé au voisinage immédiat ou à distance* drailhenn groc'hen dezvenet a-nes pe a-bell
- *les bronches les plus distales* ar bronkez pellekañ
- *les hormones, agissant à distance* an hormonou, o wezhiañ a-bell
- *les rameaux distaux d'une des branches du faisceau de His* isrannoù peltek unan eus barroù an hordenn gentez-kofig
- *réaction allergique à distance à un foyer d'infection* erwezhiad allergek abell ouzh un annon pore.

disten-

- *distensibilité myocardique* dardennusted ar c'hafer kalon
- *distension de l'œil sous l'effet de l'augmentation de la pression intra-oculaire* dardenn al lagad da heul muiadur ar gwask enlagadel
- *distension de la vésicule biliaire* dardennadur ar gellenn vestl
- *la rétractilité est la propriété d'un tissu de revenir à sa dimension antérieure après avoir subi une distension* an didennusted eo perzh ur gwriad da zistreiñ d'e vent kent goude bezañ bet dardennet.

distichiase ♦ **distichiasis** ♦ **distikiaz** g. Kammneuziad ganedigel, bezañs div rezad malgud, an eil enstedet reol, eben a-dreñv dezhi ha drekstouet; da rouestlad e stader anaezioù lec'hel : kevresaefo, kornsaefo, entropion, gouliez ha demerez ar gornsaefo.

distomatose ♦ **distomatosis** ♦ **distomatoz** g. Anv genadel an anaezioù dec'hanet gant an distom.

distomes ♦ **distoma worms** ♦ **distom** s. Genad lenkern eus urzhad an Trematod, arvevaded ouzh ar bronneged, gwezher an distomatozioù.

distorsion ♦ **distorsion** ♦ **1 gwardreiñ 2 torgamm g., torgammañ 3 gweadenn b., deweadenn b., gweañ, de-weañ** 1 Treiñ ul lodenn eus ar c'horf war un tu dre argezañ kigennoù an tu-se endeeun pe dre ziargezañ kigennoù an tu all. 2 a) distummadur ur skeudenn dre berzh ar gouskoevad krommder, b) distres gant un arhent bep ma treled en ur sanell. 3 (Bredelfennerezh) distresadur ar me dre berzh ar gwikefreoù difenn.

diurèse ♦ **diuresis, urine output** ♦ **troazhvorc'h g., troazhvorc'hañ** Arc'hwel ezvevennañ an troazh.

diurèse osmotique ♦ **osmotic diuresis** ♦ **troazhusvorc'h g. grennel** Muiaat an ec'honad troazh diwar usgrenn plasma ar gwad : gant usgrenn an troazh e-barzh pibell nezek al lounezh e tigresk dassug an dour hag e kresk an degorzh anezhañ; alese e tisoc'h un troazhvorc'hañ dourek, isvec'hiek a natriom hag a glor; azoniad a stader er c'hleñvedoù o tevoudañ usgrenn ar plasma,

da skouer en diabet gant usvec'h glukoz er gwad hag en troazh, usvec'h urea er gwad, a c'haller dec'han ivez dre ziounit glukoz, urea, mannitol (sl. *coma diabétique hyperosmolaire*).

diurèse osmotique : épreuve de la ~ ◇ ◇ **prouad an troazhusvorc'hañ** Studi degorzh an dour dindan wered an troazhusvorc'herioù grennel.

diurétique ◇ **diuretic** ◇ **1 troazhusvorc'hus aa. 2 troazhusvorc'her g. -ioù** 1 O vuiaat degorzh an troazh. 2 Lia amkanet da vuiaat ar borc'hañ dour ha kevionennoù gant al lounezh, a ziounezer dreist holl evit isvec'hiañ natriom ar plasma (*holenusvorc'herioù*); hervez al load gwerediñ e tiforc'her : a) an *troazhusvorc'herioù grennel* o tec'han un troazhusvorc'h dourek, arveret dreist holl da ziren gouliñv an empenn;b) *troazhusvorc'herioù kizenn Henle*, holenusvorc'hus, kreñv ha berbad o gwered; c) an *troazhusvorc'herioù tiazidek*, holenusvorc'hus, skañvoc'h, o werediñ e par ar bibell bellek, o vuiaat degorzh ar c'haliom — an daou rumm-mañ diwezhañ diounezet ouzh an uswask talmerel, ar skorted kalon hag ar gouliñvoù.

diverticule ◇ **diverticulum** (l. : **diverticula**) ◇ **bogod g. -où** Kavenn ezreol e stumm ur sac'h o tifourkañ en ur ganol naturel, al liesañ o vezañ : *bogod ar c'holon*, ogad bihan ar glaourgenn adreuz d'ar gahersae, a neuz hag a vent d'ur bizenn pe d'ur graoñenn gelvez; *bogod an treizher*, loet pe e parzh gouzoug an treizher, a ziwanfe da heul ar strivoù lonkañ, pe er parzh bruska, da heul ur c'hlenell ouzh ur werblenn foek.

diverticule de Meckel ◇ **Meckel's diverticulum** ◇ **bogod ar glunegenn, bogod Meckel** Bogod anarstal war ar glunegenn, loet da 80 cm diouzh an trapig klunegenn-sac'henn, aspadenn eus ar ganol a-vegel (pe kanol gadoanel); an danijenn anezhañ, dibaot kaer, zo heñvel e azonoù ouzh re an divilhennfo.

diverticulectomie ◇ **diverticulectomy** ◇ **bogodezvenañ** Lemel surjanel ur bogod eus ar ganol vezhur.

diverticulite ◇ **diverticulitis** ◇ **bogodfo g.** Tanijenn ur bogod.

diverticulose ◇ **diverticulosis** ◇ **bogodegezh b.** Bezañs eus bogodoù e lec'h-mañ lec'h eus ar ganol vezhur a zarvez dezho rouestlañ (gwadliñvoù, tanijennoù, ampeleñno); gant bogodegezh korzenn ar grozh e ranker doujañ ur vec'hiegi gorzennel.

divulion ◇ **divulsion** ◇ **1 devolc'hañ 2 digrakañ** 1 Frankaat a-helc'h (treizher, youlc'h, gouzoug a'r grozh). 2 Fregañ pe derriñ dre sachañ.

dizygote, bi-ovulaire, bivitellin ◇ **dizygotic** ◇ **daouviel aa.** A-zave da zaou c'hevell o tont eus daou vi diforc'h.

docimasia ◇ **docimasia** ◇ **dokimaziezh b., dokimaziñ** Teskad ar prouadoù renet war organoù ur c'helan evit savelañ adeg, arbenn hag amveziadoù ar marv.

docimologie ◇ **docimology** ◇ **1 Arnodennoniezh b. 2 Deskadennoniezh b. 3 Prouadoniezh b.** 1 Termen krouet gant Piéron e 1922 da envel studi reizhiadek an arnodennoù (war un dro e kinnige Piéron an termen Gl. *docimastique* "kalvezouriezh an arnodennoù", Br. *Arnodennouriezh*). 2 S ter astennet : skiant gwirierezh an anaoudegezhioù. 3 Ster ledan : skiant ar prouadoù e kement domani 'zo.

doigt en baïonnette ◇ **bayonet finger** ◇ **biz g. -ied daskamm** Disneuziad a stader gant al ledseizidi a-geñver gant an dargrezadoù war blegañ en o ezel krec'h : emañ pleget oëñsoù pellek ar biz yod hag ar biz kreiz, dreistastennet ha gouzissvellet an oëñsoù krenn ha pleget an oëñsoù nezek.

doigt en col de cygne ◇ **swan neck finger** ◇ **biz gouzoug alarc'h** Disneuziad a stader el liesarzfó rumatoidel, o kevredañ dreistastennadur ar c'henvell etre-oëñsoù nezek ha plegadur ar c'henvelloù oëñs-kreizdorn hag etre-oëñsoù pellek.

doigt en crochet ◇ **finger hook** ◇ **biz krog** Biz pleget dizistro (arzfo, stirennirgenno).

doigt en maillet ◇ **mallet finger** ◇ **biz horzh** Disneuziad diwar freg ar stirenn astenner e par ar c'henvell etre-oëñsoù pellek, alese koll eus astennadur oberiat an oëñs pellek.

doigt mort ◇ **dead finger** ◇ **biz marv** Morzidigezh laurus, kemenerion ha glazoù, alies gwelvedd hag aneraez e beg ar bized, diwar un direizh gwazhiedloc'hadel bezant e klañvadurioù diseurt (azoniad Raynaud, lounezhfo henek, h.a.).

doigt à ressort ◇ **trigger finger** ◇ **biz diaskat** Biz o chom skodet e-kerz ar plegañ pe an astenn hag o tiskodañ trumm evel lusket gant ur winterell; anadenn o c'hoarvezout gant ar meud hag ar biz bihan, devoudet gant bezañs un ozvenn war stirenn ar gigenn bleger hir.

doigt de zinc ◇ **zinc finger** ◇ **skalfad g. zink** Kemalad un ugent amindrenkenn stalet en egor evel bized ur vaneg hag ereet ouzh un atomenn zink, protein o tazgwerediñ ouzh an DNA.

doigts en coup de vent ◇ **seal fin diformity** ◇ **bizied angell reunig** Disneuziad an dorn, dambleget e genvelloù kreizdorn-oëñsoù, kosteziet e vizied avloc'h war helmo, azon peurliesañ eus al liesarzfó rumatoidel.

dolichocéphalie ◇ **dolichocephalia** ◇ **1 hirbennegezh b. 2 ushed g. klopenn, klopennushed g.** 1 (Ster klasel, neuziadurel) stumm klopenn a zo e feuriader etre 65 ha 75 (par eo ar *feuriader klopenn* d'al led × 100 / hed). 2 Disneuziadur ar c'hlopenn e rezh ur reñver ezreol eus an hed anezhañ, peurliesañ diwar askornaat kentrat ar vellez a-saezh.

dolichocôlon, dolichocolie ◇ **dolichocolon** ◇ **ushed kolon, kolonushed g.** Hirded reñverek an holl pe un darn eus ar vouzellenn dev hep ezreolded eus he c'havnez.

dolichognathie ◇ **dolichognathia** ◇ **ushed gaved, gavedushed g.** Hirded reñverek ar c'haved.

dolichoméga-artère ◇ **megadolichoartery** ◇ **ushed-usvoll g. talmerenn, talmerennushedusvoll g.** Reñver hirded ha kavnez an holl pe un darn eus un dalmerenn hep darvoll kevredet.

dolichomégaçôlon ◇ **dolichomegacolon** ◇ **ushed-usvoll kolon, kolonushedusvoll** g. Reñver hirded ha kavnez an holl pe un darn eus ar c'holon, kevret gant an antant anezhañ.

dolichomégalie ◇ **dolichomegalia** ◇ **ushed-usvoll** Reñver hirded ha kavnez ur wazhiedenn pe ur darn eus ar ganol vezhur.

dolichomégaesophage ◇ **megadolichoosophagus** ◇ **ushed-usvoll treizher, treizherushedusvoll** g. Reñver hirded ha kavnez an treizher, hemañ o vezañ ilinek en e rann izelañ.

dolichomégaevine ◇ ◇ **ushed-usvoll gwazhienn, gwazhiennushedusvoll** g. Reñver hirded ha kavnez gwazhienn gevelat un dalmerenn ushedusvolle.

dolichomorphe ◇ **dolichomorphie** ◇ **hirneuziat aa., ushedek aa.** A-zivout ar c'horf pe ur parzh korf, hir ha moan, sinkl.

dolichosigmoïde ◇ **dolichosigmoid** ◇ **ushed sigma, sigmaushed** g. Hirded reñverek ar c'holon sigma.

dolichosténomélie ◇ **dolichostenomely** ◇ **ushed-ised izili, falc'hegezh b.** Distresadur ganedigel ar pevar ezel, naouus dre hirded ha moanded an eskern, muiek en eizhaennoù, kevredet alies gant kammneuziadoù all (sl. *syndrome de Marfan*).

domaine ◇ **domain, superkingdom, empire** ◇ **domani** g. Derez uhelañ, dreist ar riezad, er *wezenn filogenetek* (Sz. *phylogenetic tree*, 1987), reizhiad rummañ ar bevion hervez ar c'hemalennoù nukleotidek boneget gant o gen, an tri domani o vezañ *Bacteria, Archaea, Eukaria*.

NOTENN* : Hiziv an deiz e teseller pevar domani evit ar bevion : sl. p. 809.

dôme : **onde en ~, onde monophasique** ◇ **Pardee's wave** ◇ **gwagenn b. war gouc'h, gwagenn unkoulz, gwagenn Pardee** Er c'halonvarrezad, dislank diauc'h argeinek eus an arroud ST o teraouiñ war varr-diskenn ar wagenn R hag oc'h enbollañ ar wagenn T a-zarn pe abezh, erzerc'had kentañ eus angwazhiad ar c'haer kalon ; padout a ra un nebeut eurvezhioù ha reiñ lec'h d'ar wagenn gurunerel (sl. *courant de lésion, Pardee : ondes de ~*).

dôme

• *choc en dôme* tos war gouc'h • *le rétrécissement se présente habituellement sous forme d'un dôme souple ou fibreux* ar strishaenn zo dezhi peurliesañ neuz ur gouc'hell vouk pe stirek • *petit nodule en dôme de 2 à 4 mm de diamètre* nozeleñn vihan hoganheñvel etre 2 ha 4 mm treuzkiz.

dominance ◇ **dominance** ◇ **trec'hegezh b.** Perzh gant ur c'henenn pe un doareenn da erzerc'hañ e pep degouezh, eleze ha pa ve unreek pe allreek ar gouzrec'h (sl. *épistatie*).

dominant ◇ **dominant** ◇ **trec'hek aa.** A-zivout ur c'henenn oc'h erzerc'haat an doareennoù en he dalc'h ha pa ve bezant war an daou gromozom eus ar re pe war unan anezho hepken ; heñvel dra, e reer *doareenn drec'hek* eus an doareenn treuzkaset dre an kez genenn ha *mod trec'hek* eus mod treuzkas ar c'hleñvedoù hêrezhel (sl. *récessif*).

domisme ◇ ◇ **tiouriezh b.** Diskiblezh o plediñ gant kement a denn d'an tiez, e-keñver load, hinad, adeiladerezh, annezadur, kened, kletadurezh, yec'hedouriezh.

dommage corporel ◇ **bodily damage** ◇ **gouad g. korf** Darallad ar c'houested kreudel ha bredel dec'hanet gant un darvoud pe ur c'hleñved ; dewerzhed gant ur mezeg kevarouezour karget da verkañ feur an dic'haouadur (sl. *aléa thérapeutique, préjudice*).

donneur universel ◇ **universal donor** ◇ **holloer g. -ion** Gouzrec'h eus ar rizh gwad O ; e hemati, hep aglutinogen, ne vezont dazgludet gant gwadvez ebet ; dre bennaenn enta eo treuzskuilhadus e wad da gement gouzrec'h 'zo.

donneur universel dangereux, donneur dangereux ◇ **universal donor dangerous, dangerous donor** ◇ **holloer dañjer-us** Gouzrec'h eus ar rizh gwad O a zo en e blasma, ouzhpenn an antikorff naturel, un antikorff antiA diwanet da heul treuzskuilhadoù, poreadoù, sankadur ur vaksin pe ur gwadvez pe ur vrazeded allspesadel, en araez enta, e tro un treuzskuilhadur, da loezañ ruzkelligoù roadourion eus ar rizoù A pe AB (sl. *groupes sanguins, incompatibilité sanguine*).

dopa ◇ **dopa** ◇ **dopa g.** Dihidroksifenilalanin, unan eus elfennoù ar ristenn o tisoc'h gant enaozañ ar c'hatekolamineier ; deverad eo eus an tirozin ha diaraoger d'an dopamin.

dopage ◇ **doping** ◇ **pistañ** Arver amkanet da zerc'haviñ an askoradour korf ha bred, digonusted ar sportourion pergen, anezhañ diouint gwezhierioù en araez da greñkiñ ar strivusted ha da c'houdaviñ anglevad ar skuizhnez (amfetamineier, aozadoù dizilbouedus pe ennevidus, kortikoidoù, androgeneier, h.a.) ; berzet eo ha haneret e vez er c'hevezadegoù.

dopamine ◇ **dopamine** ◇ **dopamin g.** Amindrenkenn devedet eus an dopa, mell diwezhañ eus ristenn enaozañ ar c'hatekolamineier, hanterad kimiek danzeet e-barzh neuron 'zo, bezant e rannbarzhioù diseurt eus an nerved kreiz ha trobarzh ; gwazhi-edfrankaus eo el louezh, er pervez hag er c'hurunerennoù ; ereet eo kleñved Parkinson ouzh an isvec'h anezhañ e lec'hioù eus an empenn (rizennegoù, steuñvenn du), alese an arver a reer eus e ziaraoger, an L-dopa, da brederiañ an anaetze ; a-geñver gant psikozioù 'zo e ve un dizurzh e kennevid an dopamin ; diounezet e vez ouzh ar bleuz dre ma vuia kas an troazh ha nerzh an argrezadoù kalon.

dopaminergique ◇ **1 dopaminwerc'her aa. 2 dopaminwerc'her g.** 1 A-zave da zilaosk pe da wered an dopamin pe o werediñ evel an dopamin ; e se e reer *nervenn dopaminwerc'her* eus un nervenn o tilaoskiñ dopamin en he bleñchoù, *buzer dopaminwerc'her* eus al loadoù ma wered an dopamin warno, *reizhiad dopaminwerc'her* eus teskad an neuron borc'her ha buzer a 'n dopamin, *lia dopaminwerc'her* eus un danvezenn naturel pe gevanaozel o werediñ evel an dopamin, eleze an L-dopa, an amantadin ha galerennoù an dopamin. 2 Danvezenn dopaminwerc'her (sl. *médiateur chimique, récepteur dopaminergique, système dopaminergique*).

dopaminomimétique ◇ **dopaminomimetic** ◇ **1 dopamin-geveler** aa., **dopaminvanek** aa. **2 dopamingeveler** g., **dopaminvaneg** g.-eier 1 O werediñ evel an dopamin. 2 Danvezenn o werediñ evel an dopamin.

Doppler : effet ~ ◇ **Doppler effect** ◇ **gwered g. Doppler** Daskemm talm ar froum paket pa loc'h mammenn ar froum e-keñver ar paker; dedalvezet e vez gant ardivinkoù mezegel evit muzuliañ tizh loc'hañ elfennoù 'zo eus ar bevedeg, herr ar gwad er gwazhied pergen.

Doppler : examen ~ ◇ **Doppler velocimetry** ◇ **herrventerezh g. Doppler** Studi amred ar gwad dre araez ur sont ec'hoder usstenioù; hervez ar gwered Doppler, dre berzh disvannadur an usstenioù ouzh an hemati war loc'h ez anavezer roud, herr ha hanren an amred gwad; arveret e vez kalvezderioù diseurt : an *dopler a-gendalc'h* (Gl. *doppler en continu*) evit erc'hwiliñ ar gwazhied bas, an *dopler poulzata* (Gl. *doppler pulsé*) evit diraez al luniadoù don evel gwazhied ha gwaskoù ar galon, an *dopler stenwereer* (Gl. *échographie-doppler*) o koublañ an daou vod imbourc'h, an *dopler livioù* (Gl. *doppler couleur*) o tiskouez e ruz al lanvadoù o nesaat d'ar paker, e glas al lanvadoù o pellaat, an *dopler enkurumerel*, *treuzklopennel*, h.a.

dorsal ◇ **dorsal** ◇ **1 ~kein, keinel** aa. **2 ~brusk, bruskel** aa. 1 A-zave da dalbenn adreñv ar c'hef. 2 A-zave da rann al livenn gein loet etre ar rann c'houzoug hag ar rann dargreiz (anvet gwechall Gl. *colonne dorsale*, hiziv Gl. *colonne thoracique*).

dorsalgie ◇ **dorsalgia** ◇ **keinost** b. Laur sezet el livenn gein.

dorsalisation ◇ **dorsalization** ◇ **bruskelaat** Diorren ezreol ar 7t mellenn c'houzoug a zo treuzfurmet ar baleg kostezennek (Gl. *apophyse costiforme*) anezhi en ur gostenn hir pe hiroc'h (*kostenn c'houzoug*); houmañ a c'hell devoudañ strafuilhoù dre amwaskañ nervedoù pe wazhied (sl. *côte cervicale*).

dorsarthrose ◇ **rachidian arthrosis** ◇ **artroz al livenn gein, livennartroz** g. Remm dic'henezhadel henek al livenn vrusk pe al livenn en he fezh hervez an aozerion.

dorsiflexion ◇ **dorsiflexion** ◇ **bruskplegañ** Stouiñ war raok al livenn vrusk.

dorsolombaire ◇ **dorsolumbar** ◇ **bruskloanel** aa. A-zave d'al lodennoù brusk ha dargreiz eus al livenn gein.

dors-
 • *aspect radiologique du pied lié à une ostéophytose dorsale ou plantaire* erzerc'had skinlun un amdeñvennegezh a-gil pe a-sol eus an troad • *c(h)orde dorsale* kordenn gein, notokordenn, arc'hlivenn • *la lèvre dorsale du blastopore* briell gein ar blastopor • *la partie la plus dorsale et médiane du feuillet moyen* al lodenn diageinañ ha kreizer eus ar feilhenn grenn.

dos droit : syndrome du ~ ◇ **straight back syndrome** ◇ **azoniad al livenn vrusk eeun** Ezvezañs rakwar reol al livenn vrusk, o leiaat treuzkiz diasaezh ar brusk hag o tevoudañ amwask ar galon etre livenn ha klerenn.

dos de fourchette ◇ **silver-fork deformity** ◇ **disneuiziad b. forc'higell** Furm valirek a vez gant an arzorn goude torr penn traoñ ar werzhid.

dose ◇ **dose** ◇ **1 doen** g. **2 doenad** g. 1 Muzul eus ur gwezher da ziounit en ur wech, dewerzhed dre unanennoù tolz, gremm, h.a. 2 Kementad eus ur gwezher degemeret gant ur gouziviad.

dose absorbée ◇ **absorbed dose** ◇ **doenad luget, doender** g. **tolzel** Kementad gremm dilaosket gant rannigoù ionaus e-barzh un unanenn dolz a zavez skinataet; ur *gremmder tolzel* eo, a zo e atalad mentawouriel L²T⁻², hag e unanenn ar *gray* (anvet *rad* gwechall) o talvoud 100 erg dre gramm.

dose absorbée : débit de ~ ◇ **(absorbed) dose rate** ◇ **doengas g. (luget)** Kementad gremm luget e-doug an unanenn amzer gant an unanenn dolz a zavez skinataet; atalad mentawouriel L²T⁻³, unanenn ar *gray dre eilenn* (arouez : Gy.s⁻¹).

dose absorbée intégrale ◇ **integral absorbed dose** ◇ **doenad luget bloc'hel** Kementad holl el gremm luget gant ar rannbarzh skinataet en e bezh.

dose efficace moyenne ◇ **median effective dose** ◇ **doenad gweredus kreizat** Doenad ul lia o tec'han ur gwered lavaret war 50 % eus al loened arnod.

dose infectieuse 50 ◇ **infective dose 50, median effective dose** ◇ **doenad poreüs 50, doenad poreüs kreizat** Doenad poreüs o tredizhañ ul loen pe un diñvadenn ur wech diwar ziv.

dose létale 50 ◇ **letal dose median** ◇ **doenad trankus 50, doenad trankus kreizat** Kementad eus un danvezenn gimiek, un toksin, un diñvadenn c'harvevel pe eus ur skinadur ionaus ret evit lazhañ 50 % eus al loened dindan arnod.

dose létale minima ◇ **letal dose minimum** ◇ **doenad trankus izek** Kementad izelañ ur gwezher o tevoudañ marv al loen arnod.

dose maxima admissible ◇ **maximal permissible dose** ◇ **doenad uc'hek aotreadus** Er skinouriezh, kementad holl el skinadoù ionaus a c'hell ur gouziviad degemer hep dañer e vuhez pad.

dose toxique moyenne ◇ **median toxic dose, TD50** ◇ **doenad pistrius kreizat** Doenad ul lia o tec'han ur gwered pistriel war 50 % eus al loened arnod.

dose volume, dose tumorale ◇ **tumo(u)r dose** ◇ **doenad yoc'henn** Kementad holl el gremm luget gant ur yoc'henn skinataet, liesad an doenad luget dre dolz ar yoc'henn jedet ent amesadel.

doser ◇ **to dose** ◇ **1 doenañ 2 dezventañ** 1 Desavelañ kementad ur gwezher (lia, skinad, h.a.) e sell d'ur mezegadur pe d'un imbourc'h (sl. *posologie*). 2 Muzuliañ kementadoù ur gwezher fizikel pe kimiek bezant en un danvez, ur metoù, h.a.; sk. *dezventañ ar glukoz er plasma, dezventañ ar radon en ur stavell*.

dosimètre ◇ **dosimeter** ◇ **doenventer** g. -ioù Ardivink amkanet da vuzuliañ ar skinadoù ionaus.

dosimétrie ◇ **dosimetry** ◇ **1 doenventerezh** g., **doenventañ** **2 doenandalañ** 1 Dezventerezh fizikel pe kimiek ar skinadoù ionaus. 2 Prizañ an doenad degemeret gant ur bevedeg diwar ar gweredoù bevoniell dec'hanet gant ur skinata.

dos-

• *actif à faibles doses* gweredus a zoenoù bihan • *administration au patient d'une dose de chlorhydrate d'arginine* ar gouziviad a lakaer da euvriñ un doenad klorhidrat arginin • *administration orale ou parentérale d'une dose de substance* diounit dre euvriñ pe dre sankañ un doenad eus un danvezenn • *après injection intraveineuse d'une dose de BSP* goude sanket dre ar wazhienn un doenad BSP • *dosage automatique* dezventañ emgefreak • *comprimé fortement dosé* moustrad doenet uhel • *dosage de l'alcalinité d'un liquide organique* dezventañ bazegezh ul liñvenn vevel • *dosage des taux des protéines du sérum* dezfeuriañ proteinoù ar gwadvez • *identifier et doser les protéines* hennadiñ ha dezventañ ar proteinoù • *injection préalable d'une très faible quantité de sérum* ensinklañ a-rakwez un doenad munut eus ar gwadvez • *prendre de la drogue à doses croissantes* kemer dram m a zoenoù argreskus • *rapport entre la dose toxique et la dose curative d'un médicament* keñver etre doen kurañ ha doen pistríañ ul lia.

dossier médical personnel ◇ **personal health record** ◇ **teuliad mezegel personel** Teskad keladoù stlennekaet a-zivout diagentoù personel ha familhel ur gouziviad (evit pep anaez, disc'h an arselladennoù klinikel hag amglinikel, danevell ar c'huzuliadennoù arbennik, ar c'hlañvdiadurioù, ar prederiadurioù, an oberatadennoù, dedroadur pep darvoud yec'hed); hervez al lezenn e Frañs e c'hell ar gouziviad kaout kennaouadur eus e deuliad mezegel.

dot blot ◇ **dot blot** ◇ **dot blot** g. Hentenn elfennañ an RNA, nes d'an *northern blot* met gwezhiet hep disparti tredannzhadel a-rakwez (sl. *buvardage, immunotransfert*).

double anonymat : *épreuve en ~, épreuve en double aveugle, épreuve en double insu* ◇ **double-blind test** ◇ **prouad** g. **ueheprat** Hentenn arveret en arnoderezh klinikel al liaoù evit hepkoriñ ar prizadurioù dangorek : diounit a reer d'ar gouziviad gwech ur plakebo, gwech al lia gwirion hep rat ken dezhañ, ken d'ar mezeg, un tredeour hepken oc'h anaout bewech natur an aozad diounezet.

double contour : *image du ~, signe du ~* ◇ **double contour sign** ◇ **arouez b. an eil trolinenn** Skinlun o tiskouez un eil bevenn e-kichen bevenn reol ur parzh organ.

double quarte : *fièvre ~* ◇ **double quartan fever** ◇ **terzhienn daoufarzhek** Terzhienn spanaus dezhi un drovezh tri deiz, an daou zevezh kentañ o vezañ terzhiennek hag an trede diderzhienn (sl. *quarte : fièvre ~*).

double quotidienne : *fièvre ~* ◇ **double quotidian fever** ◇ **terzhienn bemdeziek daouvarr** Terzhienn spanaus naouus dre zaou varr bemdez.

double tierce : *fièvre ~* ◇ **double tertian fever** ◇ **terzhienn bemdeziek klof** Terzhienn spanaus pemdeziek dezhi daou seurt barroù, disheñvel dre o doareoù hag an eur ma c'hoarvezont, pebeilet eus un deiz d'egile (sl. *tierce : fièvre ~*).

doublée : *fièvre tierce ~* ◇ **tertian doubled fever** ◇ **terzhienn dredeek daouvarr** Terzhienn spanaus dezhi daou varr pep eil devezh (sl. *tierce : fièvre ~*).

doublet : *signe du ~* ◇ **doublet's sign** ◇ **arouez an doublad** War ar c'hahervarvezad, anadiñ gwagennoù daouek o c'hoarvezout eus ur wagenn eeun a neuz vonan arreet, erzerc'had eus an detaniezh.

doubl-

• *arc double* divwareg • *cathéter à double lumière* kateter divforzh • *comprimés à double manteau* moustradoù daouwisad • *dédoublément de la personnalité* dizoubladur ar bersonelezh, daoue • *dédoublément et séparation des chromosomes* dizoubladur ha disrannadur ar c'hromozomoù • *durée double, distance double* daougeid • *folie à double phase* follezh daoulankadek • *intensité double de la rhéobase* read daougement d'al leiaread • *organite unique ou double situé à l'intérieur du centrosome* organit unel pe daouel loet er c'hentozom • *syndrome du double Y* azoniad an daou Y.

douche ◇ **shower** ◇ **1 strinkadenn** b. **2 strink** g. **dour** 1 Diounezad dour e rezh glavadenn pe flistradenn war ar c'horf a-bezh pe war ur parzh anezhañ (sl. *affusion*). 2 Avead amkanet da reiñ strinkadennoù.

Douglas : *cri ou signe du ~* ◇ **Douglas's cry** ◇ **arouez pe garm an ouf** Laur grizias a laka da youc'hal ar c'houziviadez a deutaer he c'hleuz youlc'h-kroz, erzerc'had ar freg eus ur vrazedded ezkrozhel (sl. *cul-de-sac vaginal*).

douglassectomie ◇ **douglassectomy** ◇ **oufezvenañ** Dazbidañ surjialenn ampeleñ ar c'hleuz youlc'h-kroz, kendiñvañ ar gouin hag ar youlc'h ha krafaelañ ribl ouzh ribl an div feilhenn ampeleñ dilerc'h.

douglassite ◇ **douglassitis** ◇ **ouffo** g. Ampelenno henek setez er c'hleuz youlc'h-kroz.

douleur morale ◇ **mind pain** ◇ **poan spered, laur bredel, laur askre** Kantaezad andespizadus, a arouezer pe dre leterc'hañ (diwaskadur, dinerzh, goull), pe dre c'heriennoù dangorel ken andespizadus all (tristez, gouvid, mantr, doan, grevadurezh), azon pennañ ar velankoliezh.

douleur physique, douleur somatique ◇ **physical pain, somatic pain** ◇ **poan** b. **gorf, laur** g. -ioù **kreudel, gost** b. Merzhad lec'hiek divlizus, andespizadus, a arouezer pe dre an arbenn a ardaoler outañ, pe alies dre leterc'hañ (bloñsañ, flemmañ, troc'hañ, regiñ, gweañ, poazhañ, breviñ, h.a.); ent klasel, hervez doare al laurioù, e teskriver : al *laur askornvac'hus* (Gl. *douleur ostéocope*, Sz. *ostéocope pain*), poan don, lemm an eskern hep azon all; al *laur berius* (Gl. *douleur lancinante*, Sz. *lancinatory pain*), o c'hoarvezout a bistigoù grezvarrek; al *laur dardennus* (Gl. *douleur tensive*, Sz. *tightening pain*), poan

kevret gant ur santad stendded; al *laur gwamus* (Gl. *douleur pongitive*, Gl. *boring pain*), heñvel ouzh an droug a ra ur boentenn o sankañ don er c'horf; al *laur kandreidik* (Gl. *douleur erratique*, Sz. *wandering pain*), o kemmañ lec'h dizehan; al *laur luc'hedek* (Gl. *douleur fulgurante*, Sz. *fulgurant pain*), kriz, trumm ha berrbad; *laur poentek* (Gl. *douleur exquise*, Sz. *sharp pain*), lemm ha sezet en ul lec'hien strizh; al *laur ponnerek* (Gl. *douleur gravative*, Sz. *heavy pain*), poan kevret gant ur santad pouezañs; al *laur talarus* (Gl. *douleur térébrante*, Sz. *terebant pain*), poan don heñvel ouzh an hini a rafe ur gwimeled; al *laur torwaskus* (Gl. *douleur tormineuse*, Sz. *torminal pain*), gwentl grizias o tont dre varradoù.

douleurs ◇ **pains** ◇ **gwentloù** En Amiegouriezh, argrezadoù laurus ar grozh e-kerz labour ar gwilioud.

douleur, douleur-

- *anesthésie douloureuse* aneraez laurek
- *angine peu douloureuse* huegfo amlaurek
- *douleur, algie* laur, gost
- *douleur brutale* laur feuls
- *douleur abdominale* laur kof
- *douleur en coup de fouet* laur fiblus, fiblad
- *douleur morale, anxiété* anken
- *douleur rebelle* laur kilvers
- *douleur tenace* laur dalc'hus
- *douleur très vive, violente, atroce* laur grizias
- *douleur violente, accablante* laur brevus
- *douleur vive* laur kriz
- *douleurs lombales* loanost
- *douloureux, algique, ayant la douleur pour symptôme* laurek
- *douloureux, algique, provoquant une douleur* laurus
- *douloureux, algique, relatif à la douleur* laurel
- *être, devenir douloureux* lauriñ
- *hypersensibilité à la douleur* lauruc'heraez
- *la perception douloureuse* ar merzhout laur
- *la sensibilité à la douleur* al laureraeziñ
- *non douloureux, sans douleur* dilaur
- *ressentir de la douleur* lauriñ
- *sensibilité douloureuse* gwiridigezh
- *sons douloureux* stenioù laurus.

Doyne : **dégénérescence maculaire de ~** ◇ **Doyne's honeycomb choroidopathy** ◇ **dic'henezhadur g. ar vrizhenn Doyne, tolgennsaead b. terenneñvel Doyne** Dic'henezhadur kolloidel hêrezhel eus lodenn greiz al luc'hsae; en dro d'ar vrizhenn e noter ur marelladur bosigoù melen heñvel ouzh terennnoù mel; gant an amzer e c'hell darvezout gwadliñvoù hag antevñ al luc'hsae ha, da heul, strafuilhoù ar gweled.

dracunculose, dracontiasse ◇ **dracunculosis** ◇ **drakonkuloz g.** Erialerezh ar bevedeg gant pazed filar Medina (*Dracunculus medinensis*), erzerc'het dre yoc'hennoù endan-groc'hen o pugnezñ bezant enno an arveaded.

drain ◇ **drain** ◇ **gwehennell b.** Korzenn gaoutchoug, mezell, gwer, h.a. toullouet he speur, amkanet da garzhañ ur gavenn diouzh al liñvennoù naturel pe gleñvedel bep ma furmont.

drainage ◇ **drainage** ◇ **gwehenniñ** Diskargañ kendalc'hek hogennadoù liñvel lestek pe anlestek dre areaz kalvezderioù diseurt : ebarzhiñ ur wehenell gant pe hep suc'hañ, ul lavnenn vouk, ur boule'henn, leuñviñ, h.a.; diouzh an dro, e reer anv eus *gwehenniñ bronkezwereadel* (Gl. *drainage bronchoscopique*, sl. **broncho-aspiration**); eus *gwehenniñ a'n avu* (Gl. *drainage hépatique*, sl. **cholédochostomie**); eus *gwehenniñ limfel dre verata* (Gl. *drainage lymphatique manuel*), hentenn leuñviñ evit karzhañ ar gouliñvoù dre hent gwazhied al limf; eus *gwehenniñ mareadek* (Sz.Gl. *tidal drainage*), anezhañ sifoc'hellañ ar c'hwezhihell a-daoladoù; eus *gwehenniñ loadurel* (Gl. *drainage de posture pe postural*), ma korvoer gwered ar ponnder dre ober d'ar c'hlañvoù gourvez el lakadur areazusañ da ziverañ ar borc'hadennnoù pe al linadurioù bronkez-skevent.

drain(-)

- *bronche de drainage* bronkezenn wehenniñ
- *chaîne ganglionnaire drainant la lymphe des deux tiers internes du corps de l'estomac* hadad gwerblennoù o teoueriañ al limf eus div drederenn diabarzh korf ar stomok
- *dérivation drainant une partie du sang veineux* amdreugad o teoueriañ un darn eus ar gwad gwazhiennel
- *drain temporairement placé dans le canal cholédoque* gwehenell badennek sanket er san vestl
- *drainer le contenu d'une cavité* gwehenniñ endalc'had ur gavenn
- *fin conduit recueillant et drainant la bile vers les voies biliaires* forzh vunut o tastum hag o wehenniñ ar vestl etrezek ar forzhioù bestl
- *les canalicules de drainage d'une glande exocrine* kanoligoù gwehenniñ ur wagrenn ezvorc'hañ
- *les capillaires lymphatiques assurent une fonction de drainage du milieu intérieure* roll ar c'horrwazhied limf eo gwehenniñ ar metoù diabarzh.

drapé : **signe du ~** ◇ **incisura defect** ◇ **arouez b. ar poulounez** Neuz skinlun eus roufennoù glaourgenn ar stomok oc'h anadiñ pa vez ur c'hankr : war ar c'hrommadur rageneb d'an anaf e noter un angrizadenn bad heñvel ouzh ur poulounez spilhennet, oc'h erzerc'haat peurliesañ un ensiladur hanweek.

drastique ◇ **drastic** ◇ **1 dergasus aa. 2 dergaser g. -ioù** 1 O tevoudañ gwentl ar pervez ha kac'hadennnoù darc'hoalek niverus. 2 Lia spurjañ kreñv o werediñ dre danailhañ glaourgenn ar pervez.

drépanocytes, hématies falciformes ◇ **drepanocytes, sickle cells** ◇ **drepanokit s., hemati s. falzek, hemati kornek** Hemati distummet, dezho neuz ur falz pe ur werzhid.

drépanocytose ◇ **drepanocytic anaemia, sickle cell disease** ◇ **drepanokitoz g.** Bezañs e gwad amwadeion 'zo eus hemati e stumm kreskenn (sl. *anémie à hématies falciformes*).

DRESS : **syndrome** ~ ◇ **DRESS syndrome** ◇ **azoniad DRESS** [DRESS : teskanv Sz. *Drug Rash with Eosinophilia and Systemic Symptoms* (dispuilhad diwar lia gant usniver eozinofil hag azonou reizhiadel)] azoniad dreistkizidigezh liael o kevrediñ dispuilhad kroc'hen, arouezioù hollek, strafuilhoù avu, elwenn eozinofil hag azoniad foel, stadet pergen e-kerz ar mezegadur dre an enepviruzeier.

Dressler : **syndrome de ~, syndrome post-infarctus du myocarde** ◇ **Dressler's syndrome** ◇ **azoniad Dressler, azoniad dianangwazhiad kalon** Azoniad o tarvezout a-wechoù en deizioù pe er sizhunioù war lerc'h un angwazhiad a'r c'haher kalon, anezhañ terzhienn, laurioù er brusk, amgalonennfo, krezennfo, gwechoù 'zo darwazh skevent, ustizh gouzediñ, elwenn gant ganulokitoz neutrofil; goude lies adfeilh e c'hoarvez ar pare, hag eñ buanaet gant ar mezegadur enepfo; azoniad a stader ivez da heul ur resmiad a skorted kurunerel hep mui; kevarguziñ a reer un orin unanallergek ha roll an hangaegemplezhioù.

drogue ◇ **1 drug 2 drug, raw drug** ◇ **1 drog g. -où 2 dram g. -où** 1 (Ster klasel dispredet) kentaozad ar bon- hag ar mestragevezhioù. 2 Aozad, apotikel pe get, a c'hell ar bevezñ anezhañ dec'han stadoù bred dibarek hag ar boaziañ anezhañ kemer furn un estoueañ (sl. *accoutumance, addiction, assuétude, dépendance, toxicomanie*).

dromotrope ◇ **dromotropic** ◇ **1 renwezher aa. 2 renwezher g. -ioù** 1 O wezhñ war reüsted gwiennoù ur c'haheer (ar c'haheer kalon peurliesañ). 2 Danvezenn renwezher : ur *renuswezher* (Gl. *dromotrope positif*) a vuia ar reüsted, ur *reniswezher* (Gl. *dromotrope négatif*) a leia ar reüsted (sl. *bathmotrope, bêtarécepteur, chronotrope, inotrope*).

drop attack ◇ **drop attack** ◇ **darstrap g.** Flakadur trumm an tant diaboz o tec'han eskerbad an divesker hep koll kenskiant, a seller evel dianlen d'un heskwad grezvarrek eus ar c'hef empenn diwar skorted an talmerennoù mellkein-diazpenn.

drosophiles ◇ **drosophilae** ◇ **drozofil s.** Kelien a 'r gwinegr a vez arveret ar spesad anezho *Drosophila melanogaster* evit an imboure'h en Hiloniezh.

dû

• *affection due au dépôt de sels d'argent dans le derme* anaez diwar an daspugn en derm eus halioù argant • *affections inflammatoires chroniques dues aux infections, au rhumatisme ou au cancer* anaezioù foel henek diwar bore, remm pe gankr • *déperdition sanguine due à un parasite* koll gwad devoudet gant un arvevad • *forme d'anémie acquise dans laquelle la destruction des globules rouges est due à l'action d'anticorps sériques spécifiques* furn amwad arzeuat ma vez distruj ar c'helligoù ruz e dalc'h gwered antikorfoù spesad ar gwadveiz • *maladie due à un déficit immunitaire* kleñved a-zalc'h ouzh un divigad hangae • *maladies infectieuses dues à des variétés de Borrelia* poreoù a zo o gwezherioù gouennadoù Borrelia • *mouvements désordonnés dus à une lésion du corps de Luys* fiñvoù dizurzh e dianlen un anaf er gronn endan-derc'hvel • *réduction des défenses immunitaires due à la destruction des lymphocytes T4* leiadur an difennoù hangae, dianlen da zistruj al limfokit T4 • *ulcération douloureuse et purulente due au bacille de Ducrey* gouliez laurus, linus dec'hanez gant bazhell Ducrey.

dualité

• *dualité fonctionnelle des racines* daouelezh arc'hwelel ar gwrizioù nerverl • *dualité utérine inapparente de l'extérieur* daouelezh krozh, dianat a-ziavaez.

duction ◇ **duction** ◇ **tuañ** Termen rumm oc'h arouezñ modoù fiñval 'zo a 'l lagad : gorren ha gouzizañ (*krec'hduañ* ha *traoñduañ*), nesaat ha pellaat diouzh an dalenn greizer asaezh (*entuañ* hag *etuañ*), kevreañ ar modoù fiñval kent (*kelc'htuañ*).

ductodépendant ◇ ◇ **sanrankus aa.** A-zivout ar c'hammneuziadoù kalongwazhiedel grevus a laka buhez an nevezc'haned e dalc'h dreistpad ar san dalmerel (sl. *canal artériel : persistance du ~*).

ductopénie ◇ **ductopenia** ◇ **olkanoligoù** Isniver ar c'hanoligoù bestl, ganedigel pe arzeuat (avufo pistriell), erzerc'h dre ur bestlisred henek.

duodénectomie ◇ **duodenectomy** ◇ **daouzegennezvenañ** Dazbidañ, danel peurliesañ, an daouzegenn.

duodénite ◇ **duodenitis** ◇ **daouzegennfo g.** Tanijenn an daouzegenn; peurliesañ n'he diforc'her ket diouzh ar c'hreuzfo pe ar pervezfo.

duodénogastrosopie ◇ **duodenogastroscopy** ◇ **engweliñ kreuzdaouzegenn, kreuzdaouzegennengweliñ** Engweliñ ar c'hreuz hag an daouzegenn dre araez ur fibroskop.

duodénoéjunostomie ◇ **duodenojejunostomy** ◇ **daouzegennadforzhañ er yunegenn** Skarvañ surjiael an daouzegenn ouzh ar yunegenn.

duodénopancréatctomie ◇ **duodenopancreatctomy** ◇ **ezvenañ daouzegenn-ilgreiz, daouzegennilgreizezvenañ** Dilemel surjiael an ilgreiz hag an daouzegenn, ergemennet ouzh kankr an ilgreiz, kentael pe eilvedel da gankroù ar san vestl pe ar c'hreuz.

duodénoplastie ◇ **duodenoplasty** ◇ **daouzegennatelviñ** Dazluniañ surjiael an daouzegenn ergemennet evit dienaat degouezhioù isvoll 'zo (ilgreiz gronnus da skouer).

duodénoscope, fibro-duodénoscopy ◇ **duodenofibrescope** ◇ **duodenoskop** Fibroskop amkanet da engweliñ an daouzegenn.

duodénoscopie ◇ **duodenofibrescopy** ◇ **daouzegennengweliñ** Er c'hwiliañ diabarzh an daouzegenn dre luc'hengweliñ diwarbouez ur fibroskop arbennik, hentenn kevaraez da ensinklañ ul liñvenn demer ouzh ar skinoù X e-barzh san an ilgreiz hag ar san vestl.

duodénostomie ◇ **duodenostomy** ◇ **daouzegennezforzhañ** Savelañ un ade'henoù dre skarvañ an daouzegenn ouzh speur ar c'hof dre hanterezh ur wehenell, ezforzhañ padennek evit parraat ouzh isvoll ar porzhier.

duodénotomie ◇ **duodenotomy** ◇ **daouzegennenbenañ** Digeriñ surjiael an daouzegenn.

duodénum ◇ **duodenum** ◇ **daouzegenn b.** (Daveiñ a ra an anvad latin *duodenum digitorum* d'an hed anezhi : daouzek treuz biz) lodenn deroù, fest, ar vouzellenn voan, etre ar porzhier hag ar yunegenn, pevar farzh ouzh he ober dezho stumm ur gelc'henn diglok, digor e krec'h agleiz; enni e tifourk san an ilgreiz hag ar san vestl.

duplication ◇ **duplication** ◇ **1 dizoublañ 2 azdoubladur g.** 1 Daougementiñ ar c'hromozomoù e-kerz an anafaz (trede lankad ar mitoz). 2 Gouskoevad o c'hoarvezout pa len ouzh ur c'hromozom un tamm distaget dre zilead eus ar c'hromozom kevelep pe eus ur c'hromozom all.

duplicité urétérale ◇ **ureteric duplication** ◇ **daouegezh b. ar san droazh** San droazh dizouplet, div ganol o vont diouzh daou boent diforc'h eus al lounezh, o tifourkañ er c'hwezhi-gell dre zaou zigor (sl. *bifidité urétérale*).

Dupuytren : fractures de ~ ◇ **Dupuytren's fractures** ◇ **torroù l. (g.) Dupuytren** 1 *Torr an daou ufern*, linenn dorr an ufern diabarzh o vezañ a-zremm (torr dre bellaat) pe azerc'h (torr dre nesaat), torr ar spilhenn o vezañ pell pe belloc'h diouzh an ufern diavaez (*torr Dupuytren uhel, torr Dupuytren izel*). 2 *Torr Dupuytren an ezel krec'h*, torr penn traoñ ar werzhid gant treuzlec'hiañ an dorn war zivaez ha balir penn an helmo.

Dupuytren : maladie de ~, rétraction de l'aponévrose palmaire ◇ **palmar fibromatosis** ◇ **kleñved Dupuytren, angrizañ lienstirenn ar palv** Anaev henek, dianav e arbenn, naouus dre devaat ha berraat lienstirenn ar palv, dre furmiñ enni nozeleñnoù stirek ha dre ar plegañ war gresk andireadus eus ar bizied, ar 4^e hag ar 5^e dreist holl.

Dupuytren : signe de ~ ◇ **Dupuytren's sign** ◇ **arouez b. Dupuytren** Arouez an uslaosk eus pourc'had ar c'henvell gant ar magadelled kentuet da zisvellad al lez : ar bugel en e c'hourvez, e verra e ezel traoñ p'en bounter war grec'h, a-wechoù war lerc'h un diskrog bihan.

dural ◇ **dural** ◇ **1 utev, tevat aa. 2 tevel** 1 A-geñver gant ar bilhonenn dev : a) *en-tev, tevat* (Gl. *dural*), e diabarzh ar bilhonenn dev, b) *is-tev* (Gl. *sous-dural* pe *sous-dure-mérien*), etre ar bilhonenn dev hag ar gevndegenn, c) *war-dev* (Gl. *extradural* pe *sous-dure-mérien*), etre ar bilhonenn dev hag eskern ar c'hlopenn 2 a-zave d'ar bilhonenn dev : *wardevil* (Gl. *épidural, périodural*), a-geñver gant ar gavenn war-dev (sl. *anesthésie épidermale, espace épidermal*).

dure-mère, pachyméninge ◇ **dura mater** ◇ **pilhonn b. dev** Pihonn diavaesañ, lienenn stirek gwevn enni gwazhied o c'hronnañ ar mel penn, peg start ouzh eskern ar c'hlopenn, hag ar mel a-livenn.

durillon ◇ **callosity, wart-corn** ◇ **kaledenn b., karnig g. -où** Tevadur kornhaen eus ezkcroc'hen ar palv pe sol an troad, a-wechoù sanket en derm betek anañ an askorn, a-wechoù goloet gantañ ur yalc'h levrus; anv a reer a *galedenn danailhet* (Gl. *durillon enflammé* pe *forcé*) pa zarvez d'ar yalc'h foiñ ha linañ.

dynamographe ◇ **dynamograph** ◇ **nerzhwezer b. -ioù, dinamograf g. -où** Ardivink da lerc'hwezañ nerzh ar c'higennoù.

dynamomètre ◇ **dynamometer** ◇ **nerzhventer b. -ioù, dynamometr g. -où** Ardivink da vuzuliañ nerzh ar c'higennoù.

dynam-

• *action dynamique spécifique des aliments* gwered dialuskel spesadel ar bouedoù • *adynamie* angremm • *capillardynamomètre* harzventer ar c'horrwazhied • *ataxie cinétique ou dynamique* ankedre diafiñvel • *ensemble des phénomènes dynamiques de division nucléaire* hollad an adanenoù dialuskel o c'hoarvezout da geñver emrannadur ar graoñell • *investigations hémodynamiques, angiographiques, électrocardiographiques* imboure'hioù gwadloc'honiell, gwazhiedlunadel, kalonvarr-wezadel • *la mémoire subit l'influence du dynamisme psychique, notamment affectif, du sujet* levezonet e vez ar c'hounerezh gant dialusk bredel, kantaazel pergen, ar gouzrec'h • *la pharmacodynamie est la branche de la pharmacologie qui étudie l'action des médicaments sur l'organisme* al lianiñvontiezh eo rann al liaoniezhoù o studiañ gwered al liaoù war ar bevedeg.

dynorphine ◇ **dynorphin** ◇ **dinorfin g.** Protein anaezet e-barzh neuron 'zo eus an nerved kreiz, a ya d'ober, gant an enkefalinoù hag an endorfinoù, an tri rumm morfinoù endeuat.

dysacromélie ◇ **dysacromelia** ◇ **mivleñchegezh b.** Anvad rumm an erzerc'hadoù kleñvedel, anezho usteñv eizhaennoù an izili, alies gant ezreolderioù an amaskornenn anezho, o tarvezout hogos bepred e-kerz anaezioù sezet er brus (sl. *acromélique, hippocratisme digital, ostéo-arthropathie hypertrophiante de Pierre Marie*).

dysallélognathie ◇ **dysallelognathia** ◇ **avenvigeid g.** Digempouez etre mentoù an div aven (sl. *allélognathie*).

dysarthrie ◇ **dysarthria** ◇ **migevaot g.** Strafuilh an distilh o tougen war ar c'hevaotañ, eleze gwidennañ soniadoù steuñvenn ar prezeg, a-geñver gant tizhadoù an trevnadoù loc'hañ angorzhzet gant ar c'homz : anaf en nervennoù loc'hañ (*migevaot peluzel*), en ilpenn hag er rizenne (azoniadoù parkinsonek), anaezioù kaherel (miasteniezh, kleñved Steinert) (sl. *anarthrie, aphasie, aprosodie, articulation 2, dysphasie, dysphonie*).

dysarthrose craniofaciale, dysostose craniofaciale ◇ **craniofacial dysarthrosis, craniofacial dysostosis** ◇ **migenvell g. klopenn-dremm** Digenfest ezreol ar c'hlopenn hag an dremm, trec'houllo e dalc'h an trebad eus koubloù stirek.

dysautonomie ◇ **dysautonomia** ◇ **miemrenegezh b.** Anvad rumm an azoniadoù dianlen da strafuilhoù an nervreizhiad emrennek.

dysautonomie familiale, syndrome de Riley-Day ◇ **Riley-Day syndrome** ◇ **miemrenegezh familhel, azoniad Riley-Day** Anaev hêrezhel aotozomek enkilek dibaot, a stader gant ar vugale yuzev dreist holl, naouus dre erzerc'hadoù nerval : a) er reizhiad emrennek : daeravorc'h, ec'houleviadoù gwaskel, gwrezel ha gwazhiedloc'hadel, strafuilhoù an arc'hwelioù koazhañ; b) en arc'hwelioù kehentiñ : angost hollek, direizhoù ar gweled, ar c'hwesha, ar c'henurzhiañ, isvent savder-pouez, distabiled fromel; dianav eo an ardarzh hag arvarek an erbedad (sl. *analésie, alacrymie*).

dysbasie ◇ **dysbasia** ◇ **migerzh g.** Strafuilh e fiñvoù ar c'herzhed.

dyschésie, dyschésie ◇ **dyschesia, dyschezia** ◇ **migac'h** Diaested da gac'hat.

dyschondrostéose ◇ **dyschondrosteosis** ◇ **diskondrosteoz g.** Migornvideñv hêrezhel aotozomek trec'hek naouus dre ur gorrded diwar isvent rann grenn an izili (divarvec'h ha divc'har) ha distummadurioù an divarvec'h (argrommeda a 'r werzhid, gouzissvellad war dreñv eus penn an helmo).

- dyschromatopsie** ◇ **dyschromatopsia** ◇ **livviwel** g. Anvad rumm eus direizhoù merzhout al livioù, an arlivioù pergen (sl. *achromatopsie, chromatopsie, deutéranopie, dichromasie, protanopie, trichromasie*).
- dyschromie** ◇ **dyschromia** ◇ **milivegad** g. Anvad rumm eus direizhoù livegañ a `r c`hroc`hen (sl. *achromie, hyperchromie, vitiligo*).
- dyschronométrie** ◇ **dyschronometry** ◇ **ec`houbred** g. Strafuilh er fiñverezh naouus dre un dale eus deroù an argrezañ diarvann, azon eus un tizhad a `n ilpenn.
- dysectasia cervicale, dysectasia du col de la vessie** ◇ **dysectasia of bladder** ◇ **amvoll** g. **gouzoug ar c`hwezhi-gell** Skoilh ouzh frankadur gouzoug ar c`hwezhi-gell, paotañ arbenn da azdalc`h an troazh, e dianlen un anaf (usteñv ar raksavenn, yoc`henn, skleroz ar gouzoug) pe un direizh nervel (ustant ar c`helc`hstrishaer).
- dysélastose** ◇ **dyselastosis** ◇ **dizelastoz** g. Darallad dic`henezhadel ar gwiennoù dastennek.
- dysembryome** ◇ **disembryoma** ◇ **dizembriom** g. Yoc`henn evodet diouzh aspadennoù rizhellel chomet engronnet er bevedeg, lies furm dezhi (unwiadek pe liesgwiadek) ha lies dedro (o peurazviñ ha kuñv, o chom anavz ha yud) (sl. *embryome*).
- dysembryoplasie** ◇ **dysembryoplasia** ◇ **rizhellviwe** g. Kammneuziad un organ a orin rizhellel.
- dysenterie** ◇ **dysentery** ◇ **flus** g., **dizenteri** b. Pore darreuziat ha tredizhus, naouus dre danijenn angreizhek ar c`holon, da azonou dezhañ gwentloù kriz hag un darc`hoal paoterek gant sklerennoù silwadadek; diforc`hiñ a reer div furm hervez gwezher ar pore : a) ar *flus amoebel* devoudet gant un arvevad pervezel, *Entamoeba dysenteriae* pe *Entamoeba histolitica*, stadet er broezioù tomm, oc`h adfeilhañ hag o rouestlañ dre dizhout an holl organoù, an avu alies, b) ar *flus bazhellel*, diwar *Shigella dysenteriae*, o trigañ er pervez, stadet en holl ledredennoù, na adfeilh ket (sl. *amibiaz*).
- dysentérique** : **syndrome** ~ ◇ **dysenteric syndrome** ◇ **azoniad dizenterek** Azoniad oc`h erzerc`haat an erwezh a-berzh kahersae ha glaourgenn ar youlc`h ouzh keuziadoù diseurt (poreel, arvevadel, foel pe yoc`hennel), naouus dre oulgarzhadoù puilh sklerennwadek, ezhommoù gaou, torank, tangrez.
- dysérythropoïèse** ◇ **dyserythropoietic anaemia** ◇ **dizeritropoiez** g., **ruzvibar** g., **amwad** g. **ruzvibarel** Ezreolder en azvedigezh an eritroblast o tec`han arzhelidigezh an hemati er mel hag an isniver anezho er gwad.
- dysésésie** ◇ **dysesthesia** ◇ **mieraez** g. Eraeziñ ezreol ar c`hentrigennoù stokadel (sl. *paresthésie*).
- dysfibrinogénémie** ◇ **dysfibrinogenaemia** ◇ **disfibrino-genemiezh** b. Ezreolder doareadel eus fibrinogen plasma ar gwad.
- dysfunction érectile, dysérection** ◇ **erectile dysfunction** ◇ **miarc`hwel** g. **kevodiñ, migevod** g. Skorted sonnidgezh a `r c`halc`h; termen erlec`hiet hiziv ouzh *dic`halloud* (Gl. *impuissance, Sz. impotence*).
- dysfonctionnement, dysfonction** ◇ **dysfunction** ◇ **miarc`hwel** Strafuilh en arc`hwelañ.
- dysgammaglobulinémie** ◇ **dysgammaglobulinaemia** ◇ **disgammaglobulinemiezh** Ezreolder eus gammaglobulinou ar gwadveiz, naouus dre an isfeur eus immunoglobulinou `zo, da skouer Ig G hag Ig A, pe Ig A hag Ig M, feur ar re all o vezañ reol pe muiaet (Sl. *agammaglobulinémie, immunoglobine, gammapathe*).
- dysgénésie** ◇ **dysgenesia** ◇ **mibar** g. Ezreolder an diorren e-kerz an enkrozhezh, o tec`han kammneuziadoù.
- dysgénésie épiphysaire** ◇ **epiphyséal dysgenesis** ◇ **mibar an talpennoù, talpennvibar** g. Ezreolder diorren ar broñsoù askornaat talpennel o tarvezout e miksedem kentrat ar vugale; diwezhat e tinod ar broñs ha darnaouet e van.
- dysgénésie gonadique** ◇ **gonadal dysgenesis** ◇ **mibar ar gonadoù, gonadvibar** g. Ezreolder diorren ar gonadoù, en orin ur stad etrevelel.
- dysgénésique** : **homogénéisie** ~ ◇ ◇ **kengediusted** b. **ledouennek** Rumm savelet gant Broca : embaradurioù etre hiniennoù allouenn pa vez ar ganedoù gaonac`h kenetrezo, frouezhus avat gant hiniennoù eus an div c`houenn ganer, ha gaonac`h koulskoude ar ganedoù hiron a eil remziad (sl. *agénéisie, agénéisique* : *homogénéisie*).
- dysglobulinémie** ◇ **dysglobulinaemia** ◇ **disglobulinemiezh** b. Ezreolder doareadel ha kementadel eus globulinou plasma ar gwad; lies seurtad disglobulinemiezh a ziforc`her : an *d. monoklonel* naouus dre ar vezañs er gwadveiz eus un immunoglobulin (Ig G alies), erzerc`haat, etre re all, dre anaezioù grevus (kleñvedoù Kahler, Waldenström, kleñvedoù an digorvelloù ponner); an *d. biklonel* naouus dre ar vezañs er gwadveiz eus daou immunoglobulin monoklonel (Ig A hag Ig M da skouer); an *d. poliklonel*, naouus dre an usvec`h eus holl immunoglobulinou ar gwadveiz, stadet en avufoioù lemm, er c`hirroz hag er c`hleñvedoù unan-hangaeel.
- dysgnosie** ◇ **dysgnosia** ◇ **mizenaoud** g. Furm leiek ha padennek a andenaoud.
- dysgonosomie** ◇ **gonadal dysgenesis** ◇ **disgonozomiezh** b. Kleñved diwar gouskoevad kromozomel pa zoug an ezreolder war ar c`hromozomou revel pe gonozomou.
- dysgranulopoïèse** ◇ **dysgranulopoiesis** ◇ **disgranulopoiez** g., **mibar ar granulokit** Ezreolder paridigezh ar granulokit.
- dysgraphie** ◇ **dysgraphia** ◇ **miskriv** g. Diaester da zeskiñ skrivañ ha strafuilh a `r c`houested da skrivañ.
- dysgueusie** ◇ **dysgeusia** ◇ **midañva** g. Ezreolder skiantenn an tañva (sl. *hypogueusie, pseudogueusie, hétérogueusie*).
- dysharmonie dentomaxillaire** ◇ **dento-maxillary dysharmony** ◇ **digengann dent-aven** Keñverioù digevazas etre ment an dent ha ment an divaven o tec`han pe un daskomprañ ha kammnenstudañ an dent, pe, en eneb, esaouennoù ezreol (diastemaoù) etre an dent.

- dysharmonie évolutive** ◇ **dys harmony evolutionary** ◇ **digengann g. an emdreññ** Strafuilh an diorren breidel o teraouiñ peurliesañ a-raok an oad a 6 vloaz, naouus dre an azvedigezh dizingal eus an arc'hwelioù kefredel ha kantaezel; aliet eur gant an *International Classification of Diseases (Rummadurezh etrevroadel ar c'hleñvedoù)* da arverañ an anvad *pervasive developmental disorders (direizhoù aloubus an diorren)* e lec'h an termen *dys harmony evolutionary* bet luniet gant ar vredelfennerion.
- dysématopoièse** ◇ **dyshaematopoesis** ◇ **dishematopoeiz g., mibar ar gwadkelligoù** Ezreolled paradigezh kelligoù ar gwad.
- dyshidrose, dysidrose, eczéma dysidrosique** ◇ **dys hidrosis, pompholyx** ◇ **dizidroz g., ekzema g. dizidrozek, pomfoliks** Seurtad ekzema debronek naouus dre un dispuilhad c'hwezigennoù sezet war ar palvoù, solioù an treid ha talbennoù kostezel ar bizied, o tarvezout en hañv hag o padout un pe div sizhunvezh.
- dysimmunitaire** ◇ **dys immune** ◇ **mihangaeel aa.** A-geñver gant un arc'hwelerezh ezreol eus ar reizhiad hangaeel.
- dyskaliémie** ◇ **dyskaliaemia** ◇ **gwadvivec'h g. kaliom, kaliomwadvivec'h g.** Four kaliom ezreol er gwad.
- dyskératose** ◇ **dyskeratosis** ◇ **diskeratoz g.** Keratinaat ezreol an amwiskadoù kroc'h enel ha glourgennel en araez da zedreñ e karkinom (kleñved Paget ar beg bronn, kleñved Bowen, h.a.).
- dyskinésie** ◇ **dyskinesia** ◇ **mifiñv g.** Nep strafuilh a 'r fiñval; sk. : *mifiñv bestlel* (Gl. *dyskinésie biliaire*) strafuilh loc'hadel en ur benvegad bestl salv a nep anaf neuziadurel; *mifiñv kentael ar blevanoù* (sl. *cils : syndrome des cils immobiles*), h.a.
- dyskinésie tardive** ◇ **tardive dyskinesia** ◇ **mifiñv ampellat** Azoniad a stader gant ar c'houziviaded bet diounezet dezho neuroleptier edoug bloavezhioù; c'hoarvezout a ra a fiñvoù koreoatetozek gant an divweuz, an teod, kigennoù an dremm, an izili hag ar c'hef ha padout bloavezhioù goude an dizonañ gwezherel; e zisplegañ a reer dre zaspazh ezreol hanteradoù kimiek 'zo er steuñvenn du hag er rizeneg (reñver dopamin).
- dyslalie** ◇ **dyslalia** ◇ **migefluz g.** Strafuilh eus ar c'hevaotañ o tougen war un niver bihan a soniadoù hep tizhout reolled arc'hwelioù al lavar, a orin arc'hwelel (gagerezh) pe dec'h anet gant ur gammneuziad (boulc'h) pe un anaf e benvegad an distilhañ (teod, divweuz, garloc'henn).
- dyslexie** ◇ **dyslexia** ◇ **milenn g.** 1 Strafuilh o tarvezout e-kerz al lenn reol : dic'houest da genderc'hel e chom ar gouziviad, hag adkregiñ goude paouez un nebut eilennoù; Dejerine, kentañ deskriver an anadenn, a rae anezhi "ur c'hleññ spanaus a 'n droenn gognek". 2 Hollekoc'h, "diaester dibarek da hennadiñ, da gompren ha da zianeilañ an arouezennoù skrivet" (Roudinesco). 3 Diaester da zeskiñ lenn gant ur bugel skol salv a strafuilhoù a 'r gweled, a 'r c'hleved ha, dre vras, a 'r realezh.
- dyslipémie** ◇ **dyslipaemia** ◇ **dislipemiezh b.** Four ezreol al lipid er gwad; aozerion c'hallek 'zo a ra gant *dyslipidémie*, en ur reiñ da *dyslipémie* ar ster "feur ezreol an triglikéridoù er gwad".
- dysmature** ◇ **dysmature, small for dates infant** ◇ **1 amazv aa. 2 amazved g. -idi** 1 A-zivout un nevezc'haned reol e savder met izeloc'h eget reol e bouez. 2 Nevezc'haned amazv; forc'hañ a ra an amazvidi eus ouzhpenn daou stewart diouzh ar gwerzhioù meneget gant krommennoù dave ar c'hreskiñ enkrozhel (sl. *écart type, hypotrophie des nourrissons*).
- dysmétabolie** ◇ **metabolic disease** ◇ **migennevid g.** Nep anaez naouus dre ur strafuilh er c'hennevid.
- dysmétrie** ◇ **dysmetria** ◇ **miaen g.** Ezreolled ar fiñvren en amzer hag en egor, direizhoù an enloc'hañ, ar vuanded, an heled, e dianlen anafoù an ilpenn pe ar forzhioù ilpennel; erzerc'hañ a ra peurliesañ e rezh an uc'haen (sl. *cérébelleux : syndrome ~, hypermétrie*).
- dysmétropsie** ◇ **dysmetropsia** ◇ **mentviwel g.** Diaester da andalañ pelled ha ment an traoù a weler.
- dysmimie** ◇ **dysmimia** ◇ **miveid g.** Strafuilh an eztaoliñ dre jestroù ha dremmveziou, eleze dre ar meidiñ ken diarvenn, ken diarzoug.
- dysmnésie** ◇ **dysmnesia** ◇ **migoun g.** Strafuilh leik ar c'hounerezh.
- dysmorphie, dysmorphose** ◇ **dysmorphosis** ◇ **mineuz g.** Darallad korfadurel, despizet a-wechoù a-zave da neuziou angemeret da reol en ur boblañs; an epikantuz, da skouer, a selled evel ezreol en Europa hag evel reol en Azia.
- dysmorphie orodactyle** ◇ **orofacioidigital syndrome** ◇ **mineuz genoù-bizied** Azoniad naouus dre un teskad kammneuziadoù o tizhout an dremm hag an daouarn : dazrannet emañ an teod etre flipezennou dre berzh usteñv poelloù ar genoù, boulc'hek emañ ar stavn hag ar weuz krec'h hag ezreol an dentadur; ezreolderioù diseurt a vez gant an dremm (iswe an eskern boc'h hag ar migern fri, skarlagadegezh, korravenegezh, keurvosegezh an tal) ha gant ar bizied (fle, ished, anskar, usniver); goulerc'h tolzel ha bredloc'hadel; klañvadur hêrezhel oc'h angorzhañ ar rev venevel dreist holl, daou rizh dezhañ : ar rizh I gant treuzkas gonozomek trec'hek, ar rizh II gant treuzkas aotozomek enkilek.
- dysmorphogenèse** ◇ **dysmorphogenesis** ◇ **mineuzardarz g.** Strafuilh an diorren rakganedel o tiscoc'h er c'hammneuziadoù.
- dysmorphophobie** ◇ **dysmorphophobia** ◇ **mineuzarur g.** Amgren ar gouziviad da denañ ar sellou war ul lodenn eus e gorf anglevet gantañ evel displeber, lu pe heugus, dezrannet evel ur strafuilh eus goulun an emgorf, bezant en neuroziou mac'hennel, en disnaon, er psikoziou disfaoutel.
- dysontogenèse** ◇ **dysontogenesis** ◇ **miunandarzh g.** Diorren ezreol an hinienn.
- dysorique** ◇ **dysoric** ◇ **miwadveizel aa.** A-zave d'un ezreolled a 'r gwadveiz.
- dysorthographie** ◇ **dysorthography** ◇ **mireizhskriv g.** Diaester da biaoekaat ar reizhskrivadur, strafuilh renket gant aozerion 'zo er milenn soniadel (sl. *dyslexie*).

- dysosmie** ◇ **dysosmia** ◇ **mic'hwesh** *g.* Anvad rumm strafuilhoù ar c'hwesh (sl. *hétéro-osmie, hypo-osmie, pseudosmie*).
- dysostose** ◇ **dysostosis** ◇ **askornvibar g.**, **dizostoz g.** Diorren ezreol an eskern.
- dyspepsie** ◇ **dyspepsia** ◇ **bregoazh g.** Diaester da goazhañ, termen dispis damzispredet a arverer, da c'hortoz imbourc'hioù arbennikoc'h, evit notañ un azon arc'hwelel ditouret gant ar gouziviad; anv a reer eus *bregoazh trenkek* evel azon an hiperklorhidiez, eus *bregoazh gwentezh* diwar aerlonk pe breinadurioù pervezel.
- dysphagie** ◇ **dysphagia** ◇ **brellonk g.** Diaez pe astal al lonkañ, azon ur skoilh organel pe ur strafuilh arc'hwelel eus ar c'hargadenn pe an treizher.
- dysphonie** ◇ **dysphonia** ◇ **mouezhvibar g.** Strafuilh er mouezhpárañ, a orin kreizel (migevaot) pe drobarzhel (migefluz).
- dysphorie** ◇ **dysphoria** ◇ **mieroug g.** Strafuilh en doniezh kantaezel o tec'h distabiled an noa hag an neuzid, gouziz an doug d'an ober hag al lusk etrezek an dud all, anglevadoù anvozh hag enkrezh (sl. *athymie, dépression, euphorie*).
- dysplasie** ◇ **dysplasia** ◇ **miwe g.** Ezreolder e diorreadur ur gwiad, un organ pe ur parzh organ o tarvezout 1) pe kent ar c'hanedigezh hag o tec'h kammneuziadoù pe euzhegezhioù kempadus pe get gant ar bevañ (sl. *dysembryoplasie, dysgénésie, nanisme*); 2) pe goude ar c'hanedigezh hag oc'h ec'houleviañ azvedigezh ur gwiad primaznevezus, en arvar da zisoc'h en ur stad rakkankrel.
- dyspnée** ◇ **dyspnoea, dyspnea** ◇ **1 mic'hwezh g. 2 trec'hwezh g.** 1 Kemeradur ledan, strafuilh an analerezh, sk. : *analistead* (Gl. *bradypnée*), *analustead* (Gl. *tachypnée*), *elanal* (Gl. *polypnée*), *iswent* (Gl. *hypopnée*), *uswent* (Gl. *hyperpnée*), h.a. 2 Kemeradur strizh ha boas, breüsted an analerezh.
- dyspraxie** ◇ **dyspraxia** ◇ **mizigon g.** Anvad rumm evit strafuilhoù an digoniñ, eleze an azasaat a'r fiñval diarvenn diouzh ur pal (sl. *apraxie*).
- dysprosodie** ◇ **dysprosody** ◇ **mizarlez g.** Strafuilh an darlezañ, e se an naousterioù sonel o tasperzhiañ e steuñvenn ar prezeg : ar read, an ton, ar c'hwivadur, an eolez, h.a.
- dysprotidémie** ◇ **dysproteinaemia** ◇ **disprotidemiezh** Ezreolder kementadel pe doareadel eus protid plasma ar gwad (albuminoù, globulinoù, fibrinogen) (sl. *dysglobulinémie*).
- dysraphie** ◇ **dysraphia** ◇ **mizlid g.** Strafuilh e kevandiñvañ an dlidelloù kreizel pe gostezel en orin kammneuziadoù evel ar boulc'h, an hugenn c'haolek, an ogad begel, ar spina bifida, ar c'havnvelad, ledanteñv an dremm, h.a.
- dysrhythmie** ◇ **dysrhythmia** ◇ **migorvez g.** 1 Kemeradur hollek : ezreolder ur gorvez, sk. : *migorvez trozeziat* (Gl. *dysrhythmie circadienne*). 2 Strafuilh e korvez ar galon; er c'hemeradur-mañ ez arverer peurliesañ Gl. *arythmie, Sz. arrhythmia* (sl. *arythmie*).
- dyssonnie** ◇ **dyssonnia** ◇ **mihun** Strafuilh ar c'houked.
- dysyntaxie** ◇ **migevre g.** Ezvezañs ar skiant eus urzh ar gerioù er frazenn ha, dre vras, eus reolennoù ar c'hevreadur, strafuilh lodek en ankomz enluzañ pe ankomz Wernicke (sl. *agrammatisme, paraphrasie*).
- dystasie** ◇ **dystasia** ◇ **misav g.** Anaev hêrezhel treuzkaset war ar mod aotozomek trec'hek, naouus dre strafuilhoù an diasav hag ar c'herzhed, un troad kleuz daoudu, damsteuz an damougoù a-stirenn ha kahesteriñv an eizhaennoù.
- dysthymie** ◇ **dysthymia** ◇ **minoa g.** Anvad rumm evit strafuilhoù an noa.
- dysthyroïdie** ◇ **dysthyreosis** ◇ **skoedvivorc'h g.** Ezreolder vorc'hañ, kementadel pe doareadel, ar skoedenn.
- dystocie** ◇ **dystocia** ◇ **mieskor g.** Nep diaester o tarvezout e-kerz ar gwilioud; kemm a lakaer etre 1) ar *mieskoroù treloc'hel* diwar vezañs ur skoilh askornel, kahelel pe yoc'hennel, pe diwar ar c'heñver treuzkiz etre ar grouell ha lestr ar vamm (sl. *cléidotomie*), ha 2) ar *mieskoroù arc'hwelel* diwar un ezreolder en argrezañ ar grozh.
- dystonie** ◇ **dystonia** ◇ **midant g.** 1 Direizh an tant kahelel e rezh argrezadoù andiarvenn, padek pe spanañnek, hollek pe lec'hiek, kentaal (sk. : *midant hennadek bloc'hel*, Gl. *dystonie idiopathique généralisée*), eilvedel (sk. : *midant pistriel* e dianlen dewenterezh monoksidenn garbon) pe arc'hwelel (sk. : *midant jestrel*, Gl. *dystonie de fonction*, diwar arreata an un fiñvoù : glaz ar skrivagnerion, sl. *crampe des écrivains*). 2 Strafuilh e broudadusted an nervreizhioù simpatek ha parasimpatek a renker hervez peder modelezh : a) *ustant* an div reizhiad, pe *ueüstant* (sl. *amphotonie*), b) *istant* an div reizhiad, pe *ueistant* (sl. *hypoamphotonie*), c) & d) *ustant* an eil reizhiad gant pe hep istant eben (sl. *sympaticotonie, vagotonie*).
- dystonie d'attitude** ◇ **c) 1 midant emstumm 2 midant diasav** 1 Direizh an tant kahelel, ezvezant er paouez, o tont hepken e lakadurioù 'zo eus ar c'horf pe eus an izili, o kemer furn un argrezad start ha padek eus ur stroll kigennoù, o tec'h an ur fiñvad gorrek hag argrenn, hag o tisoc'h en un emstumm anreol. 2 (Anvad dibabet gant Ch. Foix hag A. Thévenard) strafuilh en arc'hwel ar c'higennoù o terc'hel an den a-gempouez en e sav.
- dystopie** ◇ **dystopia** ◇ **milec'h g.** Kammloadur un organ, sk. : *milec'h al lounezh*.
- dystrophie** ◇ **distrophy** ◇ **mideñv g.** Ezreolder pe lec'hiek en ur gwiad pe un organ e dianlen ur strafuilh a'n teñvañ, pe hollek a orin negezel, hormonel, mezhurol, kennevidel pe arc'hwelel; boas eur da renkañ amañ ivez an anafoù dic'henezhadel a chom dianav an arbennoù kennevidel anezho.
- dystrophine** ◇ **dystrophin** ◇ **distrofin g.** Protein kahelel loet er sarkolemm a zo an divigad anezhañ en orin ar seizi gaouus-teñvek a rizh Duchenne; un ezreolder eus e luniad a stader e miopatiezh Duchenne.
- dysurie** ◇ **dysuria** ◇ **tenndroazh g.** Bec'h o tezioulañ.

E

Eagle : **syndrome d'~**, **syndrome stylo-carotidien** ◇ **Eagle's syndrome** ◇ **azoniad Eagle** Teskad azonoù diwar hirded ezreol stilhon an askorn ividig hag an hegañ a ra stelloù simpatek ar garotidenn diavaez (laurioù ividig ha drekskouarn, sutadennoù) pe ar garotidenn diabarzh (laurioù kitem ha pod-lagad); alies e tarvez azoniad Eagle da heul un daraez pe ur gwezh surjaniel (huegezvenañ, digewanañ dent).

Eaton : **maladie d'~**, **pneumonie à agglutinines froides** ◇ **Eaton's pneumonia** ◇ **kleñved Eaton, skeventfo g. aglutininoù yen** Bronkezskeventad anrizhek kentael paotañ, deskrivet e 1942 er Stadoù Unanet hag arzodet da gentañ d'ur viruz, pa 'z eo kiriek dezhañ *Mycoplasma pneumoniae*; e gwadvez ar glañvourion ez eus un aglutinin yen o reiñ tro d'ar gwadvezprouad (sl. *bronchopneumopathie de type viral*).

eau adoucie ◇ **soft water** ◇ **dour lerien, dour dic'harvet** Dour a zo bet ezvevennet dioutañ an halioù kalkiom ha magnezium.

eau déionisée ◇ **deionized water** ◇ **dour ec'hionet** Dour a zo bet ezvevennet dioutañ an halioù diwar-bouez rousinoù eskemmer ion.

eau déminéralisée ◇ **demineralized water** ◇ **dour ec'halet** Dour a zo bet ezvevennet dioutañ ar c'hation hag an anion, neptu enta ar pH anezhañ; e arverañ a c'haller evel dour strilh, met n'eo ket evel dour dishadenn.

eau libre ◇ **free water** ◇ **dour diere** Rann eus dour ar bevedeg na vez ket kevreet ouzh molekul all pe ouzh danvezennoù dourlen; emañ an dizeul anezhi e dalc'h an hormon eneptraosheiat hag al lounezh.

eau liée ◇ **bound water** ◇ **dour erret** Rann eus dour ar bevedeg kevreet ouzh molekul all hep bezañ dispennet.

eau lourde ◇ **heavy water** ◇ **dour ponner** Dour a zelun D₂O ma kemer an deuteriom lec'h an hidrogen.

eau minérale ◇ **mineral water** ◇ **dour melar, hav g. hivi** Lennad dour danzouar war zileizh enni halioù meinel sellet evel yac'haus.

eau oxygénée ◇ **hydrogen peroxyde** ◇ **peroksidenn hidrogen, dour oksigen** Dilester oksider a zelun H₂O₂ arveret e rezh dileizhenn danav evit naetaat ar goulioù.

eau potable ◇ **drinking water** ◇ **dour died, dour evañ, dour evadus** Dour yac'hus e euvriñ; e-keñver lezenn, en darn vuiañ eus ar riezoù, e vez despizet resis ar perzhioù yec'hedel ampleget gant evadusted an dour pourvezet dre ar rouedadoù kevredik pe arougoret er c'henwerzh.

eau thermale ◇ **thermal water** ◇ **dour havel, hav g. hivi** Dour melar etre 35°C ha 50°C e wrezverk en eienenn, arveret war eeun en havdrevioù.

eau transcellulaire ◇ **transcellular fluids** ◇ **dour treuzkelligel** Dour bezant e borc'hadennoù glaourgennel ha levr-gennel an organoù kleuz hag ar gwagrennoù, eleze e-barzh ar ganol vezhur, ar forzhioù troazhañ, ar stirad briant-bronkez, al liñvenn bennkein, ar forzhioù bestl, liñvennoù al lagad, o vont d'ober en holl e-tro 1,5 % eus dour ar c'horf; d'ober mentel dour ar bevedeg e sammer an dour treuzkelligel gant an dour enkelligel, an dour ezkelligel (plasma, liñvennoù entremezel, limf) hag an dour parzhiat en amparadur an eskern hag ar gwiadoù kenglenel doues, ar stirenoù hag ar migern.

eaux usées ◇ **waste waters** ◇ **dourioù karzh** Dourioù distaolet goude un arver tiadel pe vicherel, a seller evel saotret.

eaux vannes ◇ **sewage** ◇ **dourioù blez** Dourioù o tont eus lec'hioù daspugn an diouladoù (pouloù blez, kanioù distrouilh, ogleannoù lec'hidañ).

ébauch-

- *ébauche d'un organe* eginenn un organ
- *les ébauches d'organes dans l'embryon* an eginennoù organ e-barzh ar rizhell.

ébranlement ◇ **shaking** ◇ **skogata** Kalvezder leuñviñ, anezhañ sac'hañ a-ziahed war un ezel en ur reiñ dezhañ stroñsadoù a-ziadrez.

ébrio-

- *démarche ébrieuse* argenik mezdedek
- *état ébrieux* mezded
- *période ébrieuse* prantad mezded.

Ebstein : *maladie d'~* ◇ **Ebstein's anomaly** ◇ **kleñved Ebstein** Kammneuziad kalon hêrezhel dibaot, anezhi kempegad sac'helloù tilhennel hag adreñv an trapig tribroudek ouzh speur ar c'hofig dehou war an daoufarzh eus o hed, o tec'h an iskas an amred skevent, trec'hwezh ha direizhoù korvez; alies e vez kevret ur c'hehented etrekentezoù dulaseiat; hir pe hiroc'h e vez an dedro, troc'het a-wechoù gant ur marv trumm.

écarquillement

• *tic d'écarquillement* skruz an dispourbellañ.

écart-type ◇ **standard deviation** ◇ **forc'had g. rzh, strewant g.** (Stadegouriezh) Daouvonad an hebiant, arouez σ , muzul dasparzh ar reveziadennoù o forc'hañ diouzh ar c'hehented hervez braster o forc'had; en un dasparzh reol, ez eus 95 % eus ar boblañs en ur gavael 4σ , eleze o forc'hañ eus 2σ a bep tu d'ar c'hehented, alese ar reveziadennoù brasoc'h o forc'had eget 2σ a zeseller evel nemedennoù (sl. *variance*).

écarteur ◇ **retractor** ◇ **dislever g. -ioù** Ardivink amkanet da zerc'hel digor ur flañch surjaniel pe un igorenn naturel war-benn diraez ar parzhioù don.

écart-

• *cavité de taille variable suivant l'écartement des maxillaires* kavenn argemmus he ment hervez derez displev an divaven • *cicatrisation plus lente quand les lèvres de la plaie sont écartées* kleizennañ gorrekoc'h pa chom a-skar brielloù ar gouli • *demi-cylindre maintenant le drap et les couvertures écartés du corps du malade* hantergranenn o terc'hel al liñsel hag ar pallennoù a-zistok diouzh korf ar c'hlañvour • *deux traverses horizontales parallèles de hauteur et d'écartement réglables* div dreuzellen a-zremm, kenstur ha reoliadus o sav hag o skar • *l'écartement est comblé par des bourgeons charnus* barret e vez an displev gant tiñvennoù.

ecchondrome, ecchondrose ◇ **ecchondroma** ◇ **ezvigornenn b.** Balir a wiad migornel kresket diwar ar c'henvelloù, ar c'hostoù, ar c'harloc'henn; ezvigornennoù eo ozvennoù an arzfoioù henek; sellet e vez an osteokondrom evel un ezvigornenn askornaet.

ecchymose ◇ **ecchymosis** ◇ **bronduenn b., ekimoz g.** Brizhenn a drolinenn direoliek ha dispis, a liv limestra, du, gell pe arvelen, anezhi ur seurtad purpura diwar ec'hwezhiadoù gwad goudonennel er gwiad kellaouek dindan ar c'hroc'henn, ur glaourgenn pe ul levrgenn, o tont da heul ur c'hreud (bloñs) pe oc'h erzerc'haat ur strafuili eus ar gwadkæañ kentael (ezreolded kementadel pe doareadel ar pladanou).

ecchymose cadavérique ◇ **cadaveric ecchymosis** ◇ **bronduenn gelanel** Bezañs eus gwad ec'hwezhiet ha kaouledet e-barzh gwiadoù ur c'helan, arouez lezenvezegel o testiñ feulsterioù korfel gouzañvet a-raok ar marv (lakaet er-maez ur c'hogaouledusted kleñvedel pe yac'hadel).

eccrine ◇ **eccrine** ◇ **gorrevorc'hat aa.** A-zivout ur wagrenn bizhevorc'hat a zifourk he forzh degorzhañ war eeun e gorre ar c'hroc'henn, sk. ar gwagrennoù c'hwezpar (sl. *apocrine, holocrine, mérocrine*).

échancr-

• *insectes dont le prothorax échancré en avant possède des bords minces* amprevaned, ribloù silhek d'o frotrax gant un diaraog krouizek.

échange

• *les échanges respiratoires et nutritifs entre le sang circulant et les tissus irrigués* an eskemmoù analadel ha mezhurel etre ar gwad amredat hag ar gwiadoù eroueriet • *les organes où les échanges liquidiens sont importants* an organoù ma vez eskemmoù paot a liñvennoù • *techniques de mesure des échanges de chaleur entre un corps et le milieu ambiant dans lequel il est placé* kalvezderioù da vuzuliañ an tremen gwrez etre ur c'horf hag e amva.

échappée ◇ **escape** ◇ **dislaosk g., dislaoskiñ** Kalvezder leuñviñ, anezhañ pakañ krog en un dolzenn wiad, sachañ gorrek war gresk hag he lezel da vont.

échappement ◇ **escape** ◇ **ec'hamzalc'h g.** Ezreolder arc'hwelel ar galon pa zeu ur broudalf ezlec'hiat da amsviñ ar broudalf bonan (ar c'hloim god-kentez) aet e wagenn vlivaat pe re wan pe dolc'het an treledañ anezhi; loet emañ ar broudalf amsavat pe er c'hloim kentez-kofig (*ec'hamzalc'h kloimel*, Gl. *échappement nodal*), en ur barr eus an hordenn gentez-kofig pe e-barzh speur ar c'hofig (*ec'hamzalc'h kofigel*, Gl. *échappement ventriculaire*).

échappement thérapeutique ◇ **exhaust therapeutic, therapeutic escape** ◇ **eskerbiñ yac'hadel** Digresk gwered ul lia goude an diounit eus un nebeut doenadoù anezhañ (sl. *accoutumance, Besredka : méthode de ~, tachyphylaxie 2*).

écharpe ◇ **sling** ◇ **enchelp g.** Pezh lien tric'hornek arveret evit diloc'hekaat, war bleg, an ezel krec'h.

échinococcose ◇ **echinococcosis** ◇ **ekinokokoz g.** Kleñved diwar ar vezañs er bevedeg eus larvenn an *Taenia echinococcus*, erzerc'h pe dre ur *c'hist hidatek*, pe dre logigoù bihan niverus astrew e gwiad an avu.

échinocoque ◇ **Echinococcus multilocularis** ◇ **1 Echinococcus (multilocularis) g. 2 ekinokokenn u.** 1 Spesad *Taenia*, preñved plat eus urzhad ar C'hested, oc'h arvevañ e-barzh pervez ar c'hi, a c'hell e vioù bezañ evret gant an den ha, dre ziorren betek ar stad larvenn, devoudañ anafoù en organoù, en avu pergen, o danvevad. 2 Larvenn an *Echinococcus*.

échinocytes ◇ **crenated erythrocytes** ◇ **ekinokit s.** Hemati distummet, saezhigoù staled reoliek war o zro, staded er skorted lounezh hag en amwadoù 'zo; *in vitro* en o c'haver war al lifradoù graet fall, bezant int ivez er gwad mir, darvoud hemañ eilthroüs bepred.

écho de la pensée ◇ **thought echo** ◇ **heklev g. an devezout** Rizh trezerc'hañ o tougen war lanvad an devezout : e maezienn an emouezañ e tifluk devezoù na anavez ket ar gouziviad bezañ o ambredet daoust m'o anavez evel arreadoù eus e rezdehañ (sl. *automatisme mental*).

écho-encéphalographie ◇ **echoencephalography** ◇ **empennstenerluniñ** Imbourc'hiñ an empenn dre araez an usstenioù ; bannet e vez un hordenn usstenioù en empenn dre an treuzkiz daouvidig ha dastumet e vez an advantoù disvannet diwar gorreoù an eskern, luniadoù diseurt ar mel penn ha, diouzh an dro, an anafoù (yoc'henn, h.a.).

écho-endoscopie ◇ **endoscopic ultrasound, EUS** ◇ **stenengweliñ** Seurtad engweliñ ma erlec'hier un hordenn usstenioù ouzh an hordenn luc'h ; arveret e vez da erc'hwiliañ ar ganol vezhur hag ar gwazhied.

écho-ophtalmographie ◇ **echoophtalmography** ◇ **lagadstenerluniñ** Imbourc'hiñ al lagad dre araez an usstenioù, arveret pergen evit anaout stad ar parzh adreñv (diflosk al luc'hsae, yoc'henn pe gorf estren enlagadel).

échocardiographie ◇ **echocardiography** ◇ **kalonstenerluniñ** Imbourc'hiñ ar galon dre araez an usstenioù ; meur a galvezder a arverer : *k. treuzvraskel* (Gl. *é. transthoracique*), *treuztreizherel* (Gl. *é. transœsophagienne*), *k. dargemm* (Gl. *é. de contraste*), *k. dopler* (Gl. *é. doppler*), *k. stresel* (Gl. *é. de stress*), h.a.

échogène ◇ **echogenic** ◇ **advanteiat aa.** En araez da c'henel advantoù.

échogramme ◇ **echogram** ◇ **stenerlun g.** Kevregad disoc'h a 'r stenwereañ.

échographie¹ ◇ **echographia** ◇ **drec'hskriv g., drec'hskriañ** Azon bredel, anezhañ arren diarzoug skrivadoù an amgen (sl. *écholalie, échomimie, échopraxie, stéréotypie*).

échographie² ◇ **echography, ultrasonography** ◇ **stenerluniñ, stenwereañ** Hentenn imbours'hiñ un organ dre studi an disvann eus un hordenn usstenioù diwar ar c'hetalioù etre ar meteier a stenluzded amgement ; bannet e vez froumadoù a 4 da 20 megakor e rezh lerc'hiadoù luskadoù berr, hag elfennet e vez an advantoù anezho ; hervez ar braster engwerc'het, e tiforc'her ar *s. a vod A* (heled), ar *s. a vod B* (sked), ar *s. a vod M* pe *TM* (amzer loc'h), hemañ arveret er Galonouriezh pergen evit studiañ loc'h an trapigoù ; hervez doare an erluniñ, e lakaer kemm etre ar *s. unvent*, ar *s. divvent* hag ar *s. teirment*, hemañ diwezhañ arveret en Amiegouriezh hag er Galonouriezh dreist holl.

écholalie ◇ **echolalia** ◇ **drec'hluz g., drec'hluzañ** Azon bredel, anezhañ arren diarzoug deluzadoù ar c'henbrezeger (sl. *écho-graphie, échomimie, échopraxie, stéréotypie*).

échomimie ◇ **echomimia** ◇ **drec'hveid g., drec'hveidiñ** Azon bredel, anezhañ arren diarzoug ar jestroù hag an dremmveziou merzhed.

echovirus, virus ECHO ◇ **echovirus** ◇ **viruz ECHO, echoviruz g.** [ECHO : teskanv Sz. *Enteric Cytopathogenic Human Orphan*, ar pennnav *orphan* (Br. *emzivad*) o taveiñ d'ar meno ne oa kiriek ar garvev da gleñved denel ebet] Viruz eus ar genad *Enterovirus*, eus kerentiad ar *Picornaviridae*, a zo seurtadoù anezhañ e devoud anaezioù heñvel ouzh ar re dec'hant gant ar viruzoù *Coxsackie* : pilhonfoioù lemm leukokitek, kreuzpervezfoioù, gripvianoù, poreadoù analadel, h.a.

Eck : opération de von ~ ◇ **Eck's fistula** ◇ **dasforzhad g. von Eck** Gwezh surjaniel amkanet da barraat ouzh an uswask er wazhienn borzh, anezhañ dasforzhañ houmañ hag ar wazhienn gav izelañ.

éclairement (lumineux) ◇ **illumination, illuminance** ◇ **goulaouder g.** Luc'hgas dre unanenn c'horread, mentad a zo he atalad mentawouriel : $ML^2T^{-3}/L^2 = MT^{-3}$, he unanenn al *luks* (1 lumen dre metr karrez), he arouez : *lx*.

éclair-

• *dispositif d'éclairage* stignadur goulaouiñ • *l'éclairage ou quantité de lumière est le produit d'un flux lumineux par un temps* al luc'had zo liesad ul luc'hgas dre ur pad • *rapport de la radiance énergétique d'un objet à son éclairage énergétique* keñver etre gremmgaster gorreel un ergorenn hag he gremm'houlouder.

éclampsie ◇ **eclampsia** ◇ **eklampsiezh b.** Anvad a lakaed war ar barradoù droukfell dianlen da strafuilhoù kennevid, da skouer e-kerz dedro ar skorted lounezh ; hiziv n'en arverer ken nemet evit ar c'haouadoù gliziennoù tantek ha kridek heñvel ouzh an droukfell o tedreiñ etrezek ar c'homa, stadet e-kerz tri mizvezh diwezhañ ar vrazedded, da geñver pe da heul ar gwilioud (*eklampsiezh vec'hiegvezhel, eskorvezhel*, Gl. *éclampsie gravidique, puerpérale*).

éclamptique ◇ **eclamptic** ◇ **eklamptek aa.** 1 Gant an eklampsiezh. 2 A-zave d'an eklampsiezh.

éclat(-)

• *éclat intermittent du premier bruit du cœur* tregern spanaus eus trouz kentañ ar galon • *éclat métallique du deuxième bruit du cœur au foyer aortique* tregern vetal eus eil trouz ar galon er selaoennva aortek • *éclatement du noyau dont les débris essaient dans le cytoplasme* bloksidigezh ar graoñell ha strewidigezh an drailhennoù anezhi dre ar c'hitoplasm.

éclipse cérébrale ◇ **transient ischemic attack, TIA, brain eclipse, cerebral eclipse** ◇ **heskwad g. empenn berrbad, taol g. heskwad empenn, gouskeudad g. empenn** Seizi trumm ha tremeniat (ledseizi, unseizi, ankonz, ledangwel) o tarvezout gant ur gouziviad uswask, diwar ur grezvarz uswask pe andag un dalmerenn empenn.

éclipse visuelle ◇ **visual eclipse** ◇ **mougadenn b. weled** Barr dallder daoudo o padout etre un eilennoù hag un eurvezhioù, diwar gouliñv ar vegenn weled, e dalc'h an uswask enkloupenel, da ziforc'hiñ diouzh an *dallder untu tremeniat* pe *steuzwel berrbad* (Gl. *cécité monoculaire transitoire, amaurose fugace*), darvoud heskwadel diwar enfroù, ha diouzh an *dallder diwar vougadenn heol* (sl. *cécité par éclipse de soleil*).

ecmnésie ◇ **ecmnesia** ◇ **ilvre b.**, **ilvreañ** Mireal emdarzh (darfell, envedi) pe delanket (teogerezh, dramm), anezhañ un ankoun dianeat hag an distro eus ar bersonelezh da ampoent ar vuhez ma paouezas an eñvoriñ.

ecmnésique, **ecmnétique** ◇ **ecmnesic** ◇ **1 ilvreek aa.** **2 ilvreer aa.** **3 ilvreer g. -ion** **4 ilvreal aa.** 1 Gant doare an ilvre, sl. *realoù ilvreek*. 2 Oc'h ilvreañ. 3 Gouzviad oc'h ilvreañ. 4 A-zave d'an ilvre.

écoul-

• *appareil mesurant l'écoulement d'un fluide* ardivink o vuzuliañ herr diver un heverenn • *écoulement anormal du chyle* naouez anreol ar sugenn • *écoulement de liquide céphalorachidien par le nez* naouez dre ar fri eus al liñvenn benn-gein • *écoulement nasal* beradur ar fri • *les logettes entravant l'écoulement du pus* ar c'hevioùgou o skoilhañ ouzh diver al lin • *obstruction nasale avec écoulement* stankad ar fri gant beradur • *vitesse d'écoulement* herr diver.

écouvillon ◇ **swab** ◇ **tarnell b.** Tapon kotoñs staget ouzh penn ur c'harenn vetal pe mezell.

écouvillonnage ◇ **swab**, **ecouvillonnage** ◇ **tarnellañ** Sankañ un darnell e-barzh ur gavenn evit he naetaat pe evit erlemel ar borc'hadennoù a zo enni e sell d'o elfennañ.

écran

• *afficher sur un écran moniteur* gwereañ war un hewel • *caméra reliée à l'écran* kamera keneret ouzh ar skramm • *dispositif permettant l'étude du champ visuel consistant en un écran noir carré de 2 m de côté* trevnad arveret da studiañ ar gwelvaez, anezhañ ur skramm du karzezek 2 m tu • *écran fluorescent* skramm kendreluc'h • *écran renforceur* skramm dargemmaat.

écrasement¹ ◇ **crushing** ◇ **breviñ** Kalvezder leuñviñ, anezhañ rimiañ en ur waskañ ur gorread bihan kroc'hen.

écrasement² ◇ **crush** ◇ **flastr g.** Anaf diwar waskadur kreñv ha hirbad ul lodenn eus ar c'horf (sl. *Bywaters : syndrome de ~*).

écras-

• *écraser des informations* rasklañ stlennadoù • *lésion par écrasement* anaf dre vreviñ • *plaie par écrasement* gouli brevadel, gouliñ dre vreviñ, brevadenn • *syndrome d'écrasement* azoniad ar gwask, azoniad ar flastr, flastranaf.

écriture en miroir, **écriture spéculaire** ◇ **mirror writing** ◇ **skritur b. azrec'h**, **skrivañ a-zrec'h** Skrivañ al linennoù a-c'hin d'an tu reol evit ar yezh-mañ yezh, stadet e tro ar milenn pe an ankomez; pleustret ivez e-maez a nep kleñved, e ve ar mod skrivañ emdarzh gant an dom kleiz.

ectasie ◇ **ectasia** ◇ **usvoll g.** Muiadur kleñvedel kavnez un organ kleuz pe ur wazhiedenn (termen o vont da lostrann en un niver a genstrolladoù, sk. : *bronkezusvoll*, *gwazhiedusvoll*, *kolonusvoll*, *talmerennusvoll*).

ecthyma ◇ **ecthyma** ◇ **ektima g.** Seurtad impetigo angreizhek enkoradus hag unanenkoradus, naouus dre vurbuennoù mon-eizek a denn da emledañ dre o ribloù, tra ma sav en o c'hreiz un drouskenn damc'hell o c'holeiñ ur c'houliez a lez bepred ur gleizenn war he lerc'h.

ectoantigène ◇ **ectoantigen** ◇ **ektoantigen g.** Antigen loet e diavaez ar bakteri, gletet nebeut outo.

ectoderme, **ectoblaste** ◇ **ectoderm** ◇ **ektoderm g.** Feilhenn diavaez ar blastoderm a yelo d'ober an amwiskad kroc'hen hag an organoù skiantennel diouzh un tu, an nerved kreiz hag an nervennoù trobarzh diouzh an tu all (sl. *blastoderme*, *endoderme*, *mésoderme*).

ectodermose érosive pluri-orificielle ◇ **ectodermosis erosiva pluriorificialis** ◇ **ektodermoz g. graspadek liesigorennel** Anaev o tizhout an dud yaouank, naouus dre un deroù trumm, anafoù strewek glaourgennoù ar genoù (genaoufo gloevennek) hag ar gevresae dreist holl, ar glaourgennoù ganadel (kantroazhfo), anafoù kroc'hen dianatoc'h, a-wechoù eus ar rizh eritem liesstumm, erzerc'hadoù analadel ha darallad ar stad hollek; pareañ a ra dindan un nebeut sizhunvezhioù hag adfeilhañ a-wechoù; dianav eo arbenn an ektodermoz nemet e c'houlakaer keñverioù etrezañ, an eritem liesstumm hag an eritroderma gloevennek.

ectoenzyme ◇ **ectoenzyme** ◇ **ektoenzim g.** Enzim enkenennel o werediñ en diavaez eus ar gellig.

-ectomie ◇ **-ectomy** ◇ **(-)ezvenañ** Lostrann o verkañ an dilemel eus ar parzh arouezet gant ar bennrann (arveret ivez evel termen diged e brezhoneg, sl. *ablation*).

ectoparasite, **exoparasite** ◇ **ectoparasite**, **exoparasite** ◇ **amarvevad g. -ed** Arvevad struzhel pe loenel o trigañ war c'horre ar c'horf, sk. : *al laou*.

ectoparasitose, **exoparasitose** ◇ **ectoparasitosis** ◇ **amarvevadegezh b.** Anaev diwar amarvevaded.

ectopie ◇ **ectopia** ◇ **(-)ezlec'h g.** Loadur ezreol un organ (an termen brezhonek o vont ivez da lostrann en un niver a genstrolladoù, sk. : *kalonezlec'h*, Gl. *ectopie du cœur*).

ectopie testiculaire ◇ **testicular ectopia** ◇ **ezlec'h ar glidenn**, **kellezlec'h g.** Loadur ar glidenn e-maez treug reol an dehetiñ, da ziforc'hiñ enta diouzh ar *gелgellegezh* (sl. *cryptorchidie*).

ectopique ◇ **ectopic** ◇ **ezlec'hiat aa.** Loet ezreol, sl. *lounezh ezlec'hiat*, *broudaf ezlec'hiat*.

ectrocheirie ◇ **acheiria** ◇ **dornarzhelad g.** Ezvezañs c'hanedigel un dorn e darn pe en holl (sl. *acheirie*, *avortement 2*).

ectrodactylie ◇ **ectrodactylia** ◇ **bizarzhelad g.** Ezvezañs c'hanedigel un pe lies biz (sl. *adactylie*, *avortement 2*).

ectrogénie ◇ **agenesis** ◇ **arzhelad g., anpar g.** Ezvezañs c'hanedigel ur parzh korf (sl. *agénésie 2*, *avortement 2*).

ectropion ◇ **ectropion** ◇ **ektropion** g. Ezfleañ ar malvennoù.

ectropion utérin ◇ **uterine ectropion** ◇ **ektropion ar grozh** Arlankad eus epitelienn engouzougel ar grozh war an epitelienn ezgouzougel.

ectropodie ◇ **ectropodism** ◇ **troadarzhelad** g. Ezvezañs c'hanedigel un troad e darn pe en holl (sl. *avortement* 2).

eczéma ◇ **eczema** ◇ **ekzema** g. Anaez kroc'hen naouus ent klinikel dre blakadoù ruz debronek dispis o bevennoù, warno c'hwezigennoù munut o fregañ buan en ur leuskel ul levruzenn voull; ent kelligourel dre anafoù spongioz an epiderm; ent ardarzhourel dre wikefreoù allergek dre hent an hangae kelligel a rizh daleet hag an hangae dourennel; evit a sell an arbennelezh, ent klasel e lakaer kemma etre un hegad diabarzh (*ekzema genezhel, ekzema atopek, Gl. eczéma constitutionnel, eczéma atopique*) hag un hegad diavaez (*ekzema diarstok, Gl. eczéma de contact*).

eczéma aigu ◇ **acute eczema** ◇ **ekzema lemm, daroued s. lemm** Furm ekzema diarstok naouus dre anafoù c'hwezigennek, debronek ha dourasennus ledan, muiiek e tachad ar stekiñ ouzh an aozad allergenek (sl. *dermite de contact*).

eczéma atopique, eczéma constitutionnel, dermatite atopique, dermite atopique ◇ **atopic eczema, atopic dermatitis** ◇ **ekzema atopek, ekzema genezhel, kroc'henfo g. atopek** Ekzema ar vagadell o teraouiñ e tro an trede miz, naouezennek, trouskennek ha debronek kenan sezet en divjod, o trediñ a-fragadoù hag e troioù 'zo oc'h emastenn d'ar c'hef ha d'an izili, o pareañ peurliesañ a-raok an eil bloavezh; padout a ra a-wechoù betek an oad gour ha mont neuze e rezh plakadoù likenaet debronek livegat a c'hell poreañ, a bep eil gang barradoù astma, fronfo ha kevresaefo allergek, kernad pe linadell — erzerc'hadoù holl a voder dindan an anvad *atopiezh* (sl. *atopie*).

eczéma chronique ◇ **chronic eczema** ◇ **ekzema henek** Plakadoù debronek dihevonn, sec'h nemet da geñver ar resmiadoù lemm, anezho furm liesañ ar c'hleñved.

eczéma corné, eczéma kératosique ◇ **keratotic eczema** ◇ **ekzema keratozek** Keratoz ar palvoù pe solioù an treid, kemparzhkek, tev, skarrek, laurus, o tont e gorre anafoù an ekzema.

eczéma marginé de Hebra ◇ **tinea crura** ◇ **tagn g. ar varlenn** Dermatofitoz debronek diwar foue eus ar rummad *Trichophyton* naouus dre vrizhennoù kelc'hennek sezet e diabarzh an divvorzhed.

eczéma variqueux ◇ **varicose eczema** ◇ **ekzema teuc'hellel** Plakad eritematus, strewet warnañ poentoù dourasennus, o tont da rouestlad war ar c'horrwazhiedfoioù en dro d'an angreizhoù teuc'hellel.

eczématide, dermite séborrhéique ◇ **eczematid, séborrhéic eczema** ◇ **ekzematid g., ekzema soavredk** Anvad rumm kroc'henadoù nes d'an ekzema, naouus dre zispuilhadoù brizhennoù ruz gourc'hennus, hep c'hwezigennoù, o tont peurliesañ e dianlen un allergiezh c'harvel.

eczématisation ◇ **eczematization** ◇ **ekzematikaat** Rouestlad o tarvezout war dermatozioù 'zo (prurigo, iktioz) pe da heul ur mezegadur amazes o tec'han un erwezhiad kroc'hen.

éducation

• *les mouvements dans leurs rapports avec l'éducation, l'hygiène et la thérapeutique* ar bevfiñvoù en o c'heñver gant an Desavouriezh, ar Yec'hedouriezh hag ar Yac'hadouriezh.

édulcorant ◇ **edulcorant** ◇ **1 c'hwekaus** aa. **2 c'hwekauzenn** b. 1 O reiñ ur blaz c'hwek. 2 Danvezenn c'hwekaus, termen arveret peurliesañ da envel an arodoù o reiñ blaz ar sukr.

édulcoration ◇ **edulcoration** ◇ **c'hwekaat** Arodiñ ur c'hwekauzenn d'ul lia war-benn ameniñ ar blaz anezhañ.

effac-, effaç-

• *effacement progressif de la membrane nucléaire* steuzidigezh argammedek koc'henn ar graoñell • *portion de la caduque qui se soude avec la caduque pariétale, effaçant la cavité utérine* rann eus ar c'hollgenn o vont kempeg gant ar c'hollgenn a-speur, o kas da get kavenn ar grozh • *s'effaçant ou ne s'effaçant pas à la vitroprestation* diverkadus pe andiverkadus dre ar gwerennwaskañ.

effeteur ◇ **effector** ◇ **dewerc'her** g. **-ioù** Nep danvezenn, estreget an enzimoù hag an dindanadoù, en araez da zelanadiñ buanez un dazgwered enzimatek (blivaer, heuder) (sl. *allostérie*).

effect-, effet, effic-

• *action simultanée de deux médicaments se traduisant par une diminution de leurs effets* kenwered daou lia o tiseoc'h gant leiadur o gwerc'h • *coefficient d'efficacité lumineuse* gwezhiaer efedusted luc'hel, gwezhiaer luc'hedefusted, gwelsked • *coefficient d'efficacité protéique* gwezhiaer efedusted proteek • *dans le but d'effectuer des investigations hémodynamiques* en amboaz ren imbours'hioù gwadloc'honiell • *effecteurs allostériques* dewerc'herioù allosterek • *effets indésirables des médicaments* miweredoù al liaoù • *flux plasmatique efficace* lanvad plasma gwerc'hek • *l'effet anabolisant des androgènes* gwered ennevidus an androge-neier • *lymphocytes effecteurs de l'immunité* limfokit dewerc'her an hangae • *opération que l'on effectue* gwezhiaedenn a rener.

efférent ◇ **efferent** ◇ **~ezkas, ezkasat** O tont eus un organ hag o pellaat dioutañ (gwazhiedenn, nervenn ezkasat).

effleurage, pression glissée superficielle ◇ **effleurage, stroking touch, tucked surface pressure** ◇ **spinañ, pouezañ-linkañ a-vas** Doare merata, anezhañ tremen skañv an dorn a-bezh pe penn ar biziad, pe talbenn kein an oeñsoù dorn serr, war ar parzhioù korf a leuñver en amboaz hezañ ar c'hroc'hen hag ar gwiadoù gorre.

effort ◇ **1 exercice** **2 nisuus, effort** ◇ **1 strivad** g., **strivañ** **2 ec'hen** b. **-ioù** 1 Engwezhiñ nerzh da embreger un arc'hwel. 2 Strivad renet da stourm ouzh un harz.

effort : **épreuve d'~** ♦ **exercice test** ♦ **prouad g. strivañ** Arnod amkanet da andalañ talvoud arc'hwelel ar skevent hag ar galon, anezhañ ober d'ar gouziviad ren un embregad lavaret ha studiañ e vonedigezh analadel (gwentwezd) ha kalongwazhiedel (korvez ar galon, gwask talmerel, kalonvarrwezd) e-doug ha goude ar strivad; da skouer, dre zec'han un heskwad tremeniat er c'haer kalon, ez anata ar prouad ur skorted kurunerel enkelat dre zec'han ezreolderioù barrwezadel (izeladur an arroud ST); kevrediñ a reer ar prouad strivañ gant *skingannluniñ ar c'haer kalon dre an talliom 201*, bihanoc'h an delenañ anezhañ e tro an heskwad.

effort

• *angor d'effort* kevenkez diwar strivañ, kevenkez strivañ • *blocpnée d'effort* sac'hanal strivañ • *défaillance cardiaque survenant après un effort violent* falladur kalon o tarvezout da heul ur strivad taer • *incontinence urinaire d'effort* troazhandalc'h diwar striv.

effraktif, invasif, vulnérant ♦ **invasive** ♦ **trewan** aa. A-zivout ur gwezh mezegel oc'h enderc'hel treuziñ ar c'hroc'hen pe ur glaourgenn (sl. *non effraktif*).

egesta ♦ **egesta** ♦ **kac'hadoù l. (g.), oulennoù l. (b.)** Lod eus an diouladoù (Gl. *excreta*), kement danvez distaolet gant ar ganol vezhur, ken an dilerc'hiadoù diwar ar c'hennevid (disveveladoù), ken an danvezioù o deus trehentet dre ar ganol vezhur hep bezañ suget; termen arveret pa gevener ar c'hementadoù kac'het hag ar c'hementadoù euvret (*euvradoù*, Gl. *ingesta*) (sl. *excréments*).

égocentrisme ♦ **egocentrism, self-centeredness** ♦ **1 emgreizadezh b. 2 emgantadezh b. 3 emzaveadezh b.** 1 Tuadur da zezevout pep tra evel kreizet war an unan, pleg neuzid sellet evel arouez diazveted, o vont a-wechoù avat betek an ambren evel ma c'hoarvez er paranoia pe er veuvreadezh (*ambren emgantadel*, Gl. *délire égocentrique*). 2 Tuadur bred ar vugale, deskrivet evel reol gant Piaget, da gantañ o dezevout enno o unan hep klask kehentiñ gant dezevout an dud all. 3 Tuadur ar grennarded da varn pep tra a-zave dezho o unan, sellet gant Debesse evel emdroadur an tuadur reol deskrivet gant Piaget.

égophonie, voix chevrotante, voix de polichinelle ♦ **egophony, tragophonia, capriloquism, voice of Punch** ♦ **mouezh b. gavr, mouezh daskrenus, egofoniezh b., mouezh Polikinello** Dasson monklus, heñvel ouzh begeliadenn ar c'harv a glever pa selaouenner bruched klañvourion ar c'hrezennoù.

eiconomètre ♦ **eikonometer** ♦ **eikonometr** g. Ardivink da studiañ an ankeitskeudenn (sl. *aniséconie*).

eidétisme ♦ **eidetism** ♦ **dianrizhañ** Anadenn skiantennel, anezhi spurmantañ war ul lijoenn unvan un ergorenn bet merzhet diagent; anadiñ a ra ar skeudenn dianrizhet pe diouzhtu pe eurvezhioù ha sizhunvezhioù zoken goude merzhadur an ergorenn, ha diforc'h eo e se diouzh an dianlouc'h; dec'havaelet e vez hervez saveleannoù an Optik (diarsell, muiaat dindan ur werenn greskiñ); ganti e c'hoarvez daskemmadurioù hervez stad kantaezel ar gouzrec'h; emouez e chom hemañ koulskoude ouzh natur skiantennel an anadenn, nad eo ket un trezerc'hañ enta; gant ar vugale dreist holl e c'hoarvez an dianrizhañ, desellet evel reol neuze; gant an oadourion avat e c'hell an dianrizhañ amparañ ur bazenn ardreuziñ etrezek ur psikoz trezerc'hek.

Eisenmenger : **complexe d'~** ♦ **Eisenmenger's complex** ♦ **kemplezh b. Eisenmenger** Kalonanaez ganedigel dibaot, naouus dre ur c'hehentad etre-kofigoù uhel, dehouloadur an aortenn, usvoll hag uswask talmerennoù ar skevent ha dre usteñv ar c'hofig dehou a ziflister lod eus e wad en aortenn; an dedro, merket ent klinikel gant an dulaz hag ar skrouediadoù gwad, a ya peurliesañ d'ar marv a-raok an tregontvet bloavezh.

éjaculat ♦ **ejaculum** ♦ **derodad** g. Kementad ar sper strinket da geñver un derodadenn.

éjaculation ♦ **ejaculation** ♦ **derodiñ** Strinkañ ar sper dre wered argrezañ ar c'hellennoù sper.

éjaculorite ♦ ♦ **strinkerfo** g. Tanijenn ar sanioù strinker.

éject-

• *à chaque systole, chaque ventricule éjecte de 70 à 80 mL* da geñver pep sistol e tiflister pep kofig etre 70 hag 80 mL gwad
• *bruit d'éjection, claquement d'éjection, clic d'éjection* stlak an diflister • *fraction d'éjection ventriculaire* rann diflistrad kofiged
• *insuffisance aiguë de l'éjection ventriculaire* skorted lemm diflistrañ ar c'hofigoù • *phase d'éjection systolique* lankad an diflistrañ sistolel *volume de sang éjecté* ec'honad ar gwad diflistret • *souffle d'éjection* sourr an diflistrañ • *seule voie d'éjection du ventricule droit* forzh diflistrañ nemeti a r'c'hofig dehou.

ekiri ♦ **ekiri** ♦ **ekiri** g. Flus lemm o tarreuziñ e Japan, o tizhout ar vugale etre daou ha c'hwec'h vloaz, a ve kiriek dezhañ ur garvev nes d'ar golibazhell.

ektacytomètre ♦ **ektacytometer** ♦ **ektakitometr** g. Amskogventer arveret da vuzuliañ distummadusted ar c'helligoù ruz.

élabor-

• *cellule influencée électivement par une substance élaborée dans un autre point de l'organisme* kellig delanvadet a-ziuz gant un danvezenn danzeet en ul lec'h all eus ar bevedeg • *cellules dont la fonction est d'élaborer la testostérone* kelligoù o arc'hwel danzen an testosteron • *élaboration des pigments* bevenaozañ al livegennoù • *la fonction du capteur est d'élaborer des signaux* roll an enaker eo danzen arhentoù • *substances permettant l'élaboration du caillot de fibrine* danvezgennoù perzhiat e danzeidigezh ar gaouledenn fibrin.

élan(-)

• *absence d'élan vital, c'est-à-dire de la tension fondamentale qui sous-tend l'humeur* steuz ar c'hantoug, eleze an tennder boniek o c'houstonnañ an noa • *fourmillements, élancements et surtout brûlures des extrémités* kemenerion, berioù ha dreist holl loskadurezh en eizhaennoù.

élastance ◇ **elastance** ◇ **stirusted** b. Mentad treloc'hel o tenaouiñ dastennegezh speurioù un organ kleuz; ar c'heñver eo etre argemm ar gwask hag argemm an ec'honad ($\Delta P / \Delta V$); ginad ar filusted eo ar stirusted (sl. *compliance*).

élastance pulmonaire, **E_L** ◇ **lung elastance**, **E_L** ◇ **stirusted skevent**, **E_L** Argemm gwask ret d'ober argemmañ eus un unanenn ec'honad ar skevent; ent reol emañ etre 5 ha 7 cm dour dre litr; *stirusted hollel ar brusk*, *E_w*, zo sammad stirusted ar skevent ha stirusted speur ar brusk (e-tro 10 cm H₂O / l).

élastine ◇ **elastin** ◇ **elastin** g. Unan eus skleroproteinoù ar gwiad kenglenel, danvez ar gwiennoù dastennek.

élastome ◇ **elastoma** ◇ **elastom** Yoc'henn groc'henn o c'hoarvezout eus un hogennad elastin; ober a reer *elastom strewek* (Gl. *élastome diffus*) eus ur gwiskad gwiennoù dastennek darallet ha koeñvet dindan an epiderm, hemañ o vezañ livegennek ha tanavaet, anaf naoues eus dic'henezhadur kozhiadel ar c'hroc'henn; *elastom yaouerel* (Gl. *élastome juvénile*) eus usteñv dastennek an derm krenn ha don oc'h anadiñ etre ar pempet hag an dekvet bloavezh.

élastopathie ◇ **elastopathy** ◇ **dastennanaez** g. Anvad rumm evit daralladoù ar gwiad dastennek.

élastorrhexie ◇ **elastorrhexis** ◇ **dastennedvidañ** Fregadur ar gwiennoù dastennek da heul o dic'henezhadur.

élastose ◇ **elastosis** ◇ **elastoz** g. Dic'henezhadur ar gwiad dastennek.

élast-

• *cartilage élastique* migorn dastennek • *chaussure à tracteurs élastiques* botez gant dewinterioù • *chaussure orthopédique munie de deux tracteurs élastiques fixés à son extrémité antérieure* botez korfeunadel marc'het outi daou sacher war zastenn stag ouzh he beg • *élasticité de la peau* gwevnded ar c'hroc'henn • *lutter contre les résistances élastiques* stourm ouzh an harzderioù dastennek • *organe membraneux, doux, épais, résistant, élastique* organ liennek, bouk, tev, gwevn, dastennek • *tissu d'une grande élasticité* o gwriad dastenn bras gantañ.

électif, électiv-

• *action élective d'un médicament sur un tissu* gwered hanbarus ul lia war ur gwiad • *amnésie élective* ankoun hanbarus pe ezkounañ • *carence globale ou élective* negez bloc'hel pe hanbarek • *colorant diffusant rapidement et électivement dans le secteur plasmatisque* livuzenn o skignañ buan hag a-ziuz er gennad plasmatek • *déprimer électivement l'immunité* gouzizañ a-ziuz an hangae • *nodule fixant électivement le radio-isotope* nozelenn o telenañ a-ziuz ar skinizotop • *substance avec laquelle l'anticorps se combinerait d'une façon élective* danvezenn a gedio ent hanbarek outi an antikorf • *substances qui se fixent de façon élective sur les bactéries* danvezennoù o lenañ ent hanbarek ouzh ar bakteri • *trophonévrose touchant électivement les sujets masculins de race noire* trofoneuroz o tizhout ent hanbarek ar c'houreved a ouenn du.

électrisation ◇ **1 2 electrification 3 electrical injury** ◇ **1 tredanvec'hiañ 2 tredanata 3 tredangeuziañ** 1 Degas ur c'hementad tredan war ur c'horf. 2 Arloañ tredan ouzh ur gwiad bev, dre zarvoud pe evit mezegañ. 3 Dec'han strafuilhoù er bevedeg dre arloañ tredan (sl. *cautère, choc électrique, électrochoc, électrocoagulation, électrocution, électrothérapie*).

électro-absence ◇ **electroabsence** ◇ **tredandianenn** b. Dianenn dec'hanet dre ziskargañ a-dreuz d'ar c'hloppenn ur bec'hiañ tredan re vihan da zevoudañ glizi, hentenn a ve ken efedus hag an tredangridañ hep bezañ ken daraezus (sl. *absence*).

électro-analgésie ◇ **electroanalgesia** ◇ **tredandic'hostañ** Tredanfraouaat treuzkroc'hennel arveret da ziren al laur a orin nervel.

électro-anesthésie ◇ **electroanaesthesia** ◇ **tredandieraeziñ** Dieraeziñ hollek dec'hanet dre redoù uheldalm bleinekaet.

électro-ophtalmogramme, **électro-oculogramme** ◇ **electroophthalmogram, electrooculogram** ◇ **lagadvarrwezd** g. Tresenn disoc'h al lagadvarrwezañ.

électro-ophtalmographie, **électro-oculographie** ◇ **electroophthalmography, electrooculography** ◇ **lagadvarrwezañ** Kevregañ ar redoù tredan ganet gant epitelienn livegat al luc'hsae lerc'hwezet dre araez elektrodoù loet war ribl ar pod lagad.

électrobiologie ◇ **electrobiology** ◇ **Tredanvevoniezh** b. Rann eus ar Vevoniezh o tedalvout an tredan d'an imbourc'h.

électrocardiogramme ◇ **electrocardiogram** ◇ **kalonvarrwezd** g. Tresenn disoc'h ar c'halonvarrwezañ.

électrocardiographe ◇ **electrocardiograph** ◇ **kalonvarrwezer** g. -ioù Ardivink kalonvarrwezañ oc'h ober d'an dresenn disoc'h anadiñ war ur vandenn baper.

électrocardiographie ◇ **electrocardiography** ◇ **kalonvarrwezañ** Kevregañ ar c'hemmoù barr ganet gant ar c'haer kalon lerc'hwezet dre araez elektrodoù loet peurliesañ war ar c'hroc'henn e poentoù dibarek eus ar c'horf; an *amdreugadoù* (Gl. *dérivations*) eo ar modoù ma kennasker an elektrodoù hervez al lec'hioù eus ar c'horf m'o loer (sl. *dérivation 2*).

électrocardiologie ◇ **electrocardiology** ◇ **kalondredanwezañ** Studi gwerederezh tredanel ar galon, o c'hoarvezout eus ar c'halonvarrwezañ hag ar c'halonsturiadwezañ.

électrocardioscope ◇ **electrocardioscope** ◇ **kalonvarrweerer** g. -ioù Ardivink deveret eus ar c'halonvarrwezer oc'h ober d'an dresenn disoc'h anadiñ war un hewel.

électrocardiovectogramme, **vectogramme**, **vectocardiogramme**, **électrocardiogramme vectoriel** ◇ **vectorcardiogram** ◇ **kalonsturiadwezd** g. -où, **sturiadwezd** g. -où Kevregad o terc'hennañ an argemmoù barr ha stur eus gremmder tredanel ar galon e-doug an argrezañ; kedaozad an tri sturiadwezd lerc'hwezet hervez ar plaennoù a-dal, a-zremm hag a-saezh eo ar *sturiadwezd teirment* (Gl. *vectogramme spatiale*).

- électrochirurgie** ◇ **electrosurgery** ◇ **tredansurjianerezh** g. Dedalvezadur ar redoù tredan uheldalm d'ar surjianerezh (sl. *bistouri électrique, electrocoagulation*).
- électrochoc** ◇ **electroshock** ◇ **tredangridañ** Barrad glizi dec'honet dre arloañ e-doug un pe ziv dekvedenn eilenn ur red tredan pebeilat (a 300 da 600 mA, a 60 da 90 V) etre daou elektrod lakaet war ar c'hlopenn, kalvezder arveret da brederiañ bredanaezioù evel ar velankoliezh ha psikozioù ambreel lemm 'zo; ur c'halvezder heñvel, arloet ouzh ar bruski, a arverer er Galonouriezh (sl. *choc électrique, défibrillation, sismothérapie*).
- électrocoagulation** ◇ **electrocoagulation** ◇ **tredangaoulediñ** Kalvezder tredansurjanel o korvioñ ar gwrezverk uhel dedalet gant ur red tredan pebeilat uheldalm e kefin un elektrod poentek, arveret da gaoulediñ protoplasm ar c'helligoù ha da zistrujañ an anafoù (sl. *bistouri électrique, thermocoagulation*).
- électrocochléogramme** ◇ **electrocochleogram** ◇ **melc'houedennvarwezad** Tresenn kevreged dre araez un nadoz-elektrod sanket er velc'houedenn adreuz d'an daboulin evit lerc'hwezañ ar barroù tredan a-gevreizh gant ar fraouaat steneel; hentenn arveret da imbours'hiñ arc'hwelerezh kelligoù Corti ha nerved ar c'hleved.
- électrocorticographie** ◇ **electrocorticography** ◇ **pluskennvarwezañ** Empennvarwezañ graet dre loañ an elektrodoù a-stok ouzh ar bluskenn empenn, pleustr arveret en nervsurjianerezh.
- électrocution** ◇ **electrocution** ◇ **1 tredanandisha 2 tredandrakañ 3 tredangeuziañ** 1 (Ster kentañ, diwar Sz. *electro(exe)cution*) lakaat ur c'hosped d'ar marv dre wered an tredan. 2 Mervel dre wered an tredan. 3 Gouzañv strafuilhoù dre wered an tredan (sl. *électrisation*).
- électrodiagnostic** ◇ **electrodiagnosis** ◇ **tredandeznaou g., tredandeznaouiñ** Dedalvoud an tredan da imbours'hiñ ar c'houziaded; termen arveret dreist holl da geñver tredanfraouaat ar c'higennoù (sl. *electrostimulation*).
- électroencéphalogramme** ◇ **electroencephalogram** ◇ **empennvarwezad g.** Tresenn disoc'h an empennvarwezañ; naouus eo ar gwagennoù lerc'hwezet dre o heled gavaelet etre 20 ha 100 mV ha dreist holl dre o zalm : korvez $\delta < 3,5$ Hz, θ etre 4 ha 7,5 Hz, α etre 8 ha 13 Hz, $\beta > 13$ Hz; er stad a zefroù reol e vez al lañs gant ar c'horvezioù α ha β ; ar *pikbaotoù* (Gl. *pointes-ondes*), gwagennoù kemplezh o tarvezout d'an talm a etre 3 ha 3,5 / s, zo arouez an droukfell leiek (Gl. *petit mal*) (sl. *épilepsie*).
- électroencéphalographie** ◇ **electroencephalography** ◇ **empennvarwezañ** Lerc'hwezañ gwerederezh an empenn dre gevregañ ar c'hemoù tredanvarr o c'hoarvezout er bluskenn anezhañ, imbours'ho talvoud hiziv dreist holl da studiañ ar c'houesked, an droukfell, ar poreadoù (empennfo, kleñved Creutzfeldt-Jakob) hag ivez da zeznaouiñ ar marv empennel.
- électrogastroentérogaphie** ◇ **electrogastroenterography** ◇ **kreuzpervezvarwezañ** Kevregañ argemmoù gorrek an tredanvarroù o reiñ kel eus gwerederezh ar c'hreuz hag ar pervez lerc'hwezet dre araez pevar elektrod loet war an divrec'h hag an divesker.
- électrogastrographie** ◇ **electrogastrography** ◇ **kreuzvarwezañ** Lerc'hwezañ ar gweredredoù ec'hodet gant ar c'hreuz, oc'h erzerc'haat al loc'hañ hag ar borc'hañ anezhañ.
- électrogenèse, électrogénie** ◇ **electrogenesis** ◇ **tredanbarañ** Dedaoliñ tredan a-berzh ar gwiadoù bev.
- électrogramme** ◇ **electrogram** ◇ **barrwezad, tredanwezad** Lerc'hwezed eus gwerederezh tredanel ur gellig, ur gwiad pe un organ.
- électrologie médicale** ◇ **medical electrology** ◇ **Tredanouriezh b. vezegel** Skourr eus ar Fizik o plediñ gant arverioù (deznaouiñ ha yac'haat) an tredan er Vezekniezh.
- électrolyse** ◇ **electrolysis** ◇ **tredanrannañ** Dispartiañ ion ur c'hediad dre araez ur red tredan.
- électrolyte** ◇ **electrolyte** ◇ **kevionenn b.** Korf o vont e rezh ion p'en dileizher.
- électrolytémie** ◇ **electrolytaemia** ◇ **kevionwadvec'h g.** Feur ar c'hevionennoù e plasma ar gwad.
- électromyogramme** ◇ **electromyogram** ◇ **kahervarwezad g.** Tresenn disoc'h ar c'hahervarwezañ.
- électromyographie** ◇ **electromyography** ◇ **kahervarwezañ** Lerc'hwezañ tredanvarroù paouez ha gwered er c'higennoù dre araez elektrodoù loet a-c'horre pe sanket er gigenn, war eeun pe aser gant ur fraouaat galvaniek (sl. *electrostimulation*).
- électroneurographie** ◇ **electroneurography** ◇ **nervennvarwezañ** Kevregañ an tredanvarroù lerc'hwezet diwar an nervennoù trobarzh.
- électron-volt** ◇ **electron-volt** ◇ **elektron-volt g. elektron-voltoù** Unanenn c'hremm, gremm un elektronenn c'hwimmet gant ur c'hemm barr 1 volt, par da $1,6.10^{-19}$ J.
- électronystagmogramme** ◇ **electronystagmogram** ◇ **nistagmuzvarwezad** Tresenn disoc'h an nistagmuzvarwezañ.
- électronystagmographie** ◇ **electronystagmography** ◇ **nistagmuzvarwezañ** Lerc'hwezañ ameeun an nistagmuz emdarzh pe delanket dre fraouadoù gwrezel pe c'hweladel, anezhañ kevregañ ha muzuliañ argemmoù ar barr kornsae-luc'hsae diwar-bouez elektrodoù arloet ouzh ar c'hroc'hen en dro d'ar podoù lagad.
- électrophorégramme** ◇ **electrophoregram, electrophoretogram** ◇ **tredannizhwezad g.** Kevregad eus disoc'h an tredannizhañ.
- électrophorèse, cataphorèse** ◇ **electrophoresis** ◇ **tredannizhañ** Loc'hañ etrezek an elektrodoù, dre zelanvad un tredanvaez, a ra rannigoù tredanvec'hiet en arlug e-barzh ul liñvenn, anadenn korvoet evit dispartiañ ar proteinoù bezant e liñvennoù ar bevedeg,

er gwadvez pergen (an albumin hag ar globulinou α , β , γ) ; ar re-mañ, e diraez un dileizhenn skurzer a pH lavaret, a iona hag a ziloc'h en tredanvaez gant tizhoù kevreizh da vent, da stumm ha da dredanvec'hiad o molekul.

électrophysiologie \diamond **electrophysiology** \diamond **Tredanvedouriezh** **b.** Studi ar redoù tredan ec'hodet gant ar bevedeg ; an *dredanvedouriezh vonel* a bled gant an tredanvarroù paouez ha gwered er c'helligoù nerval ha kaherel ; an *dredanvedouriezh klinikel* a ra war-dro an tredanvarroù en organoù : empennvarrwezañ, luc'hsaevarrwezañ, kalonvarrwezañ ; merkomp neoazh, ne zesell tredanvedouriezh ar galon nemet an tredanvarroù lerc'hwezet dre elektrodoù loet war c'horre pe e kavennoù an organ.

électroprotéinogramme \diamond **electroproteinogram** \diamond **tredanbroteinrestrad** **g.** Kevregad pe delun o terc'hennañ feur pep protein en ul liñvenn eus ar bevedeg, peurgetket er gwadvez (albumin, globulinou α , β , γ) e disoc'h an tredannizhañ.

électropuncture, électro-acupuncture \diamond **electropuncture** \diamond **tredanwanañ** Seurtad nadozwanañ ma kaser ur red tredan dre an nadoziou.

électrorétinographie \diamond **electroretinography** \diamond **luc'hsaevarrwezañ** Kevregañ ar redoù tredan ganet gant neuroepitelienn al luc'hsae dindan ur fraouaat luc'hel lerc'hwezet dre araez elektrodoù loet war ar gornsae ha ribl ar pod lagad.

électrospalnchnographie \diamond **electrospalnchnography** \diamond **flugezvarrwezañ** Kevregañ argemmoù gorrek an tredanvarroù oc'h erzerc'haat gweredezh ar flugez koazhadel lerc'hwezet dre araez elektrodoù loet war groc'hen ar c'hof.

électrostimulation \diamond **electrostimulation** \diamond **tredanfraouaat** Fraouaat (ur gigenn, ar galon) dre araez ur red tredan.

électrostimulus \diamond **spike** \diamond **fraoubik** **g.** Pik war ar c'halonvarrwezañ oc'h erzerc'haat gwered an tredanfraouaer.

électrosystole \diamond **electrosystol** \diamond **fraousistol** Lamm kalon delanket gant un tredanfraouaer (sl. *stimulateur cardiaque*).

électrosystolie \diamond **electrosystoly** \diamond **fraousistoliñ** Kalvezder da brederiañ istead an tolc'had kentez-kofig, anezhañ delankañ argrezadoù ar galon diwar-bouez tredanskogoù korvezek ; pa vez difrae ez arloer elektrodoù an tredanfraouaer war groc'hen ar bruske pe en o ebarzher dre gateteriñ er c'hofig kleiz ; er prederiadur padek ez ensteuder un tredanfraouaer bihan (adalf) e-barzh speur ar c'hof pe ar bruske hag an elektrodoù a anlener war c'horre ar galon (*enluskañ gorrekalonel*) pe a loer dre ur sont e-barzh ar c'havennoù dehou (*enluskañ enkavennel*).

électrothérapie \diamond **electrotherapy** \diamond **tredangurañ** Arverañ an tredan evel gwezher yac'hadel (sl. *cardioversion, électrochirurgie, électrochoc, électropuncture, ionisation, rayonnements, stimulateurs*).

électrothermie \diamond **electrothermy** \diamond **tredanwreziñ** Genel gwrez dre araez an tredan, kalvezder arveret er yac'hadouriezh evit distrujañ gwiadoù diwar-bouez un elektrod tomm.

électrotropisme \diamond **electrotropism** \diamond **tredangerc'h** **g.** -ioù, **tredangerc'hañ** Perzh ar protoplasm da vezañ dedennet pe argaset gant an tredan.

électr-

axe électrique du cœur tredanahel ar galon • *bistouri électrique* tredanerc'hel • *charge électrique* bec'hiad tredan, tredanvec'hiad, tredanad, tredandolzid • *choc électrique* tredansak • *condensateur électrique, capacité* tredandougell • *conduction électrique* tredanren • *désordres hydroélectrolytiques* strafuilhoù dourkevionel • *dédoublement électrophorétique* dizoubladur tredannizhadel • *électrocapillarité* tredansilluskañ • *électro-coagulation* tredangaoulediñ • *électroluminescence* tredandre luc'hañ • *électromètre capillaire* tredanventer silluskañ • *enregistreur-ment électrique* tredanwezañ • *galvanocautére* tredanezer • *investigations électrocardiogra-phiqes* imboure'hioù kalonvarrwezadel • *taux d'électrolytes dans le plasma sanguin* feur ar c'hevionennoù e plasma ar gwad.

élément

• *éléments cartilagineux* elfennoù migorn • *éléments figurés du sang* elfennoù luniek ar gwad • *particule élémentaire* rannig elfennel • *la fibrine, élément principal du caillot sanguin* ar fibrin, kedrann bennañ ar gaouledenn wad • *premier élément d'une chaîne de mesure* elfenn gentañ ur ristenn vuzuliañ.

éléphantiasis \diamond **elephantiasis** \diamond **elefantiaz** **g.** Muiadur a-vras ec'honad an ezel pe ur parzh all eus ar c'horf diwar ur gouliñv limfel kalet ha henek eus an amwiskadoù, eilvedel d'un anaez ganedigel (azoniad Klippel-Trenaunay) pe d'un anaez dre skoilhad limfel a orin yoc'hennel, poreel pe arvevadel (filariaz).

élevateur \diamond **elevator** \diamond **gorreer** **g.** -ioù Benveg Dentouriezh, anezhañ ul loc'henn a sanker el logig evit digewanañ an dent.

éleveurs d'oiseaux : maladie ou poumon ou pneumopathie des ~, poumon des éleveurs de pigeons \diamond **bird breeders' lung** \diamond **skeventad** **g.** an **evnerion** Skeventad hangaeel lemm, goulemm a-wechoù, diwar zewentañ un antigen bezant e-barzh fank sec'h evned 'zo (dubeed, peruchenned, yer).

élev-, élev-, élev-

• *bulles circonscrites ou surélévements phlycténulaires* klogorennoù hevonn pe tosennoù filboc'hennek • *élévation anormale du taux de glucose sanguin* gwadusvec'h glukoz • *élévation de la pression veineuse* uswask gwazhiennel • *élévation de la rénine circulante* usvec'h ar renin amredad • *élévation des phosphatases alcalines* usvec'h ar fosfatazoù alkaliek • *élévation des pressions en amont* muiadur ar gwask en argrec'h • *élévation du taux de la glycémie* muiad eus bec'h ar glukoz gwad • *élevures pustuleuses et nodosités de l'épiderme* tosennoù burbuennek hag ozvennoù an ezkrac'hen • *mouvements d'élévation et d'abaissement de l'œil* fiñvoù goren ha gouzizañ al lagad • *polysaccharide de poids moléculaire élevé* polisakarid uhel e dolz mol.

élimin-

• *débit d'élimination* tolzkas ezvevennañ • *élimination urinaire accrue d'arginine* troazhuskarzh an arginin • *élimination ou inactivation* ezvevennañ pe ezniñvañ • *l'absorption et l'élimination urinaire du calcium* sugañ ha dioulañ ar c'halkiom • *élimination urinaire augmentée* troazhusvorc'h • *les déchets sont éliminés sous forme d'urine, de fèces, de sueur* ezvevennet e vez an dezveveladoù e rezh troazh, mon, c'hwez • *non toxique et facile à éliminer* anpistri hag ezvevennadus • *partie de la muqueuse utérine qui est éliminée avec le placenta* lodenn eus glourgenn ar grozh a vez dilaosket a-ser gant an dorzhienn • *produit d'élimination (vomissement ou diarrhée)* ezvevennad (c'hwelad pe darc'hoalad) • *taux d'élimination urinaire du calcium* feur kalkiom dioulet dre an troazh • *taux d'élimination urinaire d'ammoniaque* feur an amoniak ezvevennet dre an troazh.

élixir ◇ **elixir** ◇ **eliksir** g. Angevezh apotikel, meskad siroziou gant alkooolatou; en 20t kantved e veze diounezet c'hoazh a-wechoù, evel enepdarc'hoaleg, an *eliksir paregorek*, ouzh e ober opiom, trenkenn venzoek, kanfr hag aniz.

élongation ◇ **elongation** ◇ **1 dehirañ 2 arhedañ 3 darhedañ** 1 Sachañ ahelel arloet ouzh ur rann gorf, ouzh ar mell kein pergen, sk. : *dehirañ al livenn* (Gl. *élongation* pe *traction vertébrale*). 2 Hiraat o c'hoarvezout gant un organ pe ur rann organ, sk. : *arhedañ eus rann izelañ ar grozh* (Gl. *élongation du segment inférieur de l'utérus*) er gwilioud. 3 Hiraat daraezel ur gignenn, *darhedañ kigennel* (Gl. *élongation musculaire*) o tizhout peurliesañ ar sportourion (sl. *claquage musculaire*).

Elpénor : **syndrome d'~** ◇ **Elpenor's syndrome** ◇ **azoniad Elpenor** [Chomet kousket oa Elpenor, martolod yaouank Ulises, war doenn dinaz Kirke goude mezviñ; bet galvet gant ar skipailh, badaouet c'hoazh, e tapas lamm d'an traoñ ha lazhet e voe] Strafuilh gant tud alkoolet pe drammet o tihuniñ en ul lec'h na anavezont ket, hag int damarluzek, ezaouet, drezet, o kas realoù diarzoug euverus dezho o unan pe d'ar re all.

éluat ◇ **eluate** ◇ **amolc'had** g. Danvezenn bet amsunet ha lakaet war zileizh en-dro.

éluer, élution ◇ **to elute, elution** ◇ **amolc'hiñ** Ec'hamsunañ un danvezenn bet lenet ouzh ur skor (rousinoù ioneskemmer da skouer) hag he lakaat war zileizh en-dro.

élytrocèle, entérocéle vaginale ◇ **elytrocele** ◇ **oufogad** g. Avelenn ar pervez diskennet er c'hleuz youlc'h-krozh (*ouf*, Gl. *cul-de-sac de Douglas*) hag oc'h ober da speur adreñv ar gouin balirañ mui pe vui, kevret a-wechoù gant ur c'hommogad ar youlc'h (sl. *colpocèle*).

élytrorragie ◇ **colporrhagia** ◇ **gouinwadiñv** g. Koll gwad dre ar gouin.

élytrorrhaphie, colporrhaphie ◇ **colporrhaphy** ◇ **gouindlita** Krafaelañ ur rann eus ar gouin ganti he unan goude he dazbevaat, war-benn startaat ar c'harbedenn ha parraat ouzh izad an organoù genel.

émaciation ◇ **emaciation** ◇ **kulez** g. Treutadur bras kleñvedel diwar an disvezhur, an negezh pe ur c'hleñved henek (poreadur, kankr, h.a.).

émanation ◇ **emanation** ◇ **evodad** g. Aezhenn skinoberiek distabil kenan diwar ec'haoz emdarzh ar radiom ha korfoù skinoberiek all.

émanothérapie ◇ **emanotherapy** ◇ **evodadkurañ** Arver yac'hadel evodadoù ar c'horfoù skinoberiek : ar *radon*, an *toron* (evodadoù ar radiom hag an toriom).

émasculation ◇ **emasculation** ◇ **disgouevañ** Spazhañ ur gourev.

embarras gastrique ◇ **acute gastric attack** ◇ **strapad** g. **stomok** Diaez koazhadel, anezhañ strafuilhoù kreuz-pervez anglevet gant ar gouziviad kevredet a-wechoù gant azonoù ergorel evel an derzhienn hag un daolenn poreadur pe pistriadur.

embarrure ◇ **depressed fracture of the skull, dish-pan fracture, derby hat fracture** ◇ **torr distammat** Torr eus ar c'hlopenn dre bukadur, un tamm eus ar volzpenn o vezañ distaget en e bezh ha diskennet war un nebeut milimetroù.

emboitage ◇ **casing** ◇ **empradur** g., **emprañ** Arloañ kraou un osod ouzh an ezel moñs.

emboiture ◇ **socket** ◇ **kraou** g. **krevier** Penn nezek un osod da vezañ empret ouzh an ezel moñs.

emboîter

• *deux demi-capsules s'emboîtant l'une dans l'autre* daou hantervolc'han skarvet an eil ouzh egile.

embole ◇ **embolus** ◇ **enfraouenn** b. Korfsonnel pe aezhel deloc'het gant red ar gwad, anezhañ ur gaouledenn, un tamm aterom distaget diouzh speur ur wazhiedenn, un hogennad kelligoù kankrek, strinkenoù kolesterol, aezhenn ensinklet dre zarvoud, h.a.

embolectomie ◇ **embolectomy** ◇ **enfraouennezenañ** Gwezh surjaniel evit azforzhekaat ur wazhiedenn steviet gant un enfraouenn.

embolie ◇ **embolism** ◇ **enfroù** g. **enfraouiou, enfreier** Anforzh o tarvezout trumm en ur wazhiedenn wad pe limf diwar ur c'horf sonnel pe aezhel bet degaset gant red ar gwad hag o steviañ an oaled anezhi.

embolie amniotique ◇ **amniotic fluid embolism** ◇ **enfroù amnionel** Darvoud grevus dibaot o c'hoarvezout e-kerz ur gwilioud rouestladedek diwar an tremen e-barzh amred gwad ar vamm a liñvenn amnionel dechalet ganti bruzun mekoniom ha keratin a ya da steviañ talmerennigoù ar skevent; goude un nebeut ragazonoù (diaez hollek, enkreuz, kefroù, kridiennoù, simuc'h) e tarvez trumm ur c'hoempad gant dulaz, trec'hwez hag arsav a 'r galon marvus; a-wechoù e vez hiroc'h an dedro, o vont d'un daolenn a galon skeventien lemm, gwadliñvoù dre gaoulediñ engwazhiedel strewek ha skorted lounezh lemm.

embolie croisée, embolie paradoxale ◇ **crossed embolism, paradoxal embolism** ◇ **enfrouù kroaziet, enfrouù diac'h-inek** Steviadur un dalmerenn drobarzh gant un trombuz loc'het diouzh ur wazhienn drobarzh ha tremenet en aortenn dre un igorenn ezreol en dilhenn etre ar c'hentezoù peurliesañ.

embolie gazeuse ◇ **air embolism** ◇ **enfrouù aezhel, aerenfrouù** Steviadur gwazhied gant klogor (aer peurliesañ) ebarzhet dre zarvoud e-kerz un daraez pe ur gwezh yac'hadel (surjianerezh, trefennadenn, ensinkladdenn er wazhienn) (sl. *aéroembolisme, caissons : maladie des ~*).

embolie grasseuse ◇ **fat embolism** ◇ **enfrouù behinel** Enfrouù o tizhout meur a lec'h war un dro er bevedeg, rouestlad diwar an torroù, torr an askorn morzhed gant al liesdaraezidi pergen; an enfraouenn, anezhi ent klasel takennoùigoù behin o tont eus ar mel eskern hag o treuziñ korrwazhied ar skevent, a zisoc'hfe hervez aozerion 'zo diwar gengludadur *in situ* kilomikron ar gwad da heul digempouez daraezel ar gwastadennoù fizikel-kimiek; hervez sez an anafoù, e stader meur a daolenn glinikel, evel ar skorted analadel lemm, skorted an amred bras : purpura, darvoudoù nerval (ledseizi, koma), lagadel (naouezzennoù ar blein adreñv, gwadliñvoù), lounezhel (troazhlipidegezh).

embolie pulmonaire ◇ **pulmonary embolism** ◇ **enfrouù skevent** Steviadur un pe lies barr eus kef ar skevent gant trombuzoù o tont eus tiriad ar wazhienn gav; mar dec'han a-wechoù un angwazhiad skevent anat, e stader alies un daolenn glinikel diglok : diaez hollek, kalonustead, pistig, ha neuze, da resizañ an deznaou, e vez ezhomm eus imboure'hioù estreget ar skinluniñ : skingannluniñ, c'hwilervñ ulidek, gwazhiedluniñ a 'r skevent.

emboligène ◇ **embolic, emboligenic** ◇ **enfraoueiad g.** O tevoudañ enfraouioù.

embolisation ◇ **embolization** ◇ **enfraouennadur g., enfraouennañ** Steviadur yac'hadel funell dalmerel ur gammneuziad (angiom), ur yoc'henn pe un anaf gwadliñvek andiraez ent surjanel; evit e zewerc'hañ e kateterer talmerenn vagañ an anaf hag e tessezer enni un tamm kigenn pe danvezenn gevanaoz war-benn dec'han un tromboz evit anforzhañ ar wazhiedenn.

embololalie, embolophasie ◇ **embololalia** ◇ **aotadluz g., aotadluzañ** Strafulh ar gomz, anezhañ ensoc'hañ elfennoù gourleuniad (soniadoù, gerioù, bommoù) etre unvezioù steuñvenn ar prezeg.

embranchement ◇ **phylum** ◇ **skourrad g.** Live ar rummouriezh klasel, rummad etre ar riezad hag ar gevrennad.

embrasse ◇ **embracing** ◇ **kavaz g. -où** Bandenn hantergelc'hiek reut o keneren dre an adreñv garennoù un amstedell ezel (sl. *béquille d'avant-bras*).

embrocation ◇ **embrocation** ◇ **1 anniant g. 2 anniantañ** 1 Liñvenn a arloer ouzh ur parzh korf dre skuilhañ ha rimiañ. 2 Arloañ un anniant.

embrochage ◇ **pinning** ◇ **beriañ** Gwezh surjanel, anezhañ sankañ ur ber en un askorn evit e gestedañ pe e sell d'un astenn diastal (sl. *broche*).

embryocardie ◇ **embryocardia** ◇ **krouelldead g.** Darallad korvez ar galon o reiñ dezhi neuz hini ar grouell : herrekaat, keitaat an daou dav, heñvelaat an daou drouz (sl. *bruits du cœur*).

embryogénèse, embryogénie ◇ **embryogenesis** ◇ **rizhelldarzh g.** Diorreadur ar rizehell.

embryogénique ◇ **embryogenic** ◇ **rizhellvidarzhel aa.** A-zivout ar yoc'henoù hag ar furmadurioù diwar wariadoù eus diorreadur ar rizehell (imboud arvevat, trebad un organ ardreuzat, kist dermoidel, mol, dekiduom).

embryologie ◇ **embryology** ◇ **Rizhelloniezh b.** Studi ar rizehell en he neuziadur hag he diorreadur.

embryome, dysembryome tératoïde ◇ **embryoma** ◇ **embriom g.** Yoc'henn yud sonnel sezet e par ar vierez, ar glidenn, a-wechoù er rannbarzh kroazell-belost, er poullkreiz, h.a., enni gwiadou deveret diouzh teir feilhenn ar blastoderm hag, e troioù 'zo, eginennoù organ.

embryon ◇ **embryo** ◇ **rizhell b.** Anvad roet d'an engehentad e-doug an tri mizvezh kentañ anezhañ er spesad den; diwar ar pevare miz e komzer eus *krouell* (Gl. *fœtus*) (sl. *âge gestationnel, conceptus*).

embryopathie ◇ **embryopathia** ◇ **rizhellanaez g., rizehellnaoued g.** Anvad rumm evit ar c'hammneuziadoù diwar wezherioù (skinadoù ionaus, aozadoù kimiek, garvevion) o deus tizhet ar rizehell, sk. : ar *rizhellanaez ruzigel* o tevoudañ kammneuziadoù lagadel (ferennlug), klopennel, kalonel hag un isteñv hollek.

embryoscopie ◇ **embryoscopy** ◇ **rizhellwerañ** Arselliñ ar rizehell *in utero* dre araez un histeroskop diastok ebarzhet dre gouzoug ar grozh betek lienennoù ar vi, imboure'h gwezhiet a-raok trede mizvezh ar vec'hiegi dindan reoliñ dre stenwerañ war-benn diourmat ar c'hammneuziadoù.

émétine ◇ **emetin** ◇ **emetin g.** Alkaloid douhennet eus an ipeka, gwezher c'hweliñ hag amoeblazher.

émétique, vomitif ◇ **emetic** ◇ **1 c'hwelus aa. 2 c'hweluzenn b.** 1 (Danvezenn) o tec'han ar c'hweliñ. 2 Danvezenn c'hwelus.

émétisant ◇ **emetic** ◇ **c'hweteiat aa.** (stad kleñvedel) o tec'han ar c'hweliñ, sk. : *paz c'hweteiat*.

émission ◇ **emission** ◇ **ec'hodiñ** 1 (Fizik) dedaoliñ gwagennoù tredanwarellel, rannigoù elfennel, gwrez, froumadoù, h.a. 2 (Kehenterezh) kas arhentoù o tougen eul pe ster. 3 (Bevedouriezh) teurel er-maez ul liñvenn dindan wask (sk. : *ec'hodiñ troazh pe troazhodiñ, dioulañ, ec'hodiñ sper pe derodiñ*).

émet-, émiss-

- *difficulté à gérer la chaîne parlée, notamment à contrôler la durée des émissions et des pauses* bec'h o verañ steuñvenn ar gomz,

peurgetket o reoliñ padelezh an ec'hodadoù hag ar paouezoù • *diods émissives* diodoù ec'hodiñ • *émetteur de rayonnements* α , β , X ou γ ec'hoder skinadoù α , β , X pe γ • *émettre des phonèmes* ec'hodiñ soniadoù • *émettre un rayonnement X* ec'hodiñ ur skinad X • *faisceau d'électrons émis par la cathode d'un générateur de rayons X* hordenn elektron ec'hodet gant katod ur ganer skinoù X • *émettre une objection* deluzañ un arbennadenn • *invitation à émettre* goudeñ da gas • *émission et réception d'un signal* ec'hodiñ hag enodiñ un arhent • *l'émission du langage oral* ec'hodiñ al lavar teodel • *impossibilité d'émettre* un son dic'halloud da ec'hodiñ ur son • *présence de germes dans l'urine dès son émission* bezañs garvevion en troazh da ampoent an dioulañ • *radioactivité émise par le corps humain* skinoberiegezh ec'hodet gant korf an den • *radioélément se déséxcitant en émettant un rayonnement β^-* skinelfenn o tiargridañ en ur leuskel ur skinad β^- • *signaux fluorescents émis sous l'action d'un rayon laser* arhentoù kendreluc'h ec'hodet dindan ur skin laser • *transporter un signal d'un émetteur vers un récepteur* lakaat un arhent da vont eus ur c'haser d'ur paker • *trouble de la phonation consistant en l'émission simultanée de deux sons* strafuilh ar mouezhparañ, anezhañ ec'hodiñ daou son war un dro.

emménagogue, ménagogue ◇ **emmenagogue** ◇ **1 hevizliñver aa. 2 hevizliñver g. -ioù** 1 O tec'han hag o reoliekaat ar mizioù. 2 Lia hevizliñvus.

emmetrope ◇ **emmetropic** ◇ **hestiek aa., hestiwel aa., hestiwel g.** A-zivout ul lagad pe ur gouziviad, a zo reol gantañ ar gouskogañ.

emmétropie ◇ **emmetropia** ◇ **1 hestiegezh b. 2 hestiwel g.** 1 Doare ur reizhiad luc'honiell kuit a vistiegezh, eleze a ezreolderioù gouskogañ. 2 Hestiegezh al lagad.

émollient ◇ **emollient** ◇ **1 laoskaus aa. 2 laoskaer g. -ioù** O tistennañ hag o voukaat ar gwiadoù taniennet.

émonctoire ◇ **emunctory** ◇ **karzhva aa. -où** Organoù a dalvez da ezvennañ dilerc'hiadoù an eznevid : an avu, ar c'han troazh, ar c'hwezhiell, an divfron, ar fraezh, al lounezh, ar savnigoù, ar skevent.

émotif, émotionnel ◇ **1 emotional 2 emotive** ◇ **1 fromerezhel aa., fromel aa. 2 fromidik aa. 3 gourfromidik aa.** 1 A-zeve d'ar fromerezh. 2 Douget da fromañ. 3 Gant un doug reñverek da fromañ.

émotivité ◇ **emotivity** ◇ **1 fromerezh g. 2 fromidigezh b. 3 gourfromidigezh b.** 1 Arvez eus an neuzid oc'h angorzhañ ar bred hag ar c'hreud, mod ersaviñ dre gantaezadoù elfennel, emanglevadoù hag erzerc'hadoù nervstruzhel. 2 Doug da fromañ. 3 Doug reñverek da fromañ.

empâté ◇ **choked** ◇ **toazennek aa.** Gant ur c'hantalc'h blot, na gwevn, na dastennek.

empathie ◇ **empathy** ◇ **kefaeziñ** Anglevout evel hon re kantaezadoù un den a zarempredomp.

empéripolèse, empéripolésis ◇ **emperipolésis** ◇ **emperipolez g.** Treant ur gellig e-barzh unan all hep ma ve fagokitet pe darallet, sk. : emdizh al leukokit e-maez ar gwazhiennigoù a-dreuz da gelligoù o speurioù (ha n'eo ket etrezo) (sl. *diapédèse*).

emphysème ◇ **emphysema** ◇ **emfizem g.** Ensilad aezhenn er gwiad kellaouek.

emphysème pulmonaire ◇ **pulmonary emphysema** ◇ **emfizem skevent** Stad kleñvedel ar skevent, naous dre usvoll ha dispenn ar c'horrvronkez analadel hag elfennoù kenglenel-dastennek al logigoù ; kemm a lakaer etre an *emfizem kreizhoginel* (Gl. *e. centrolobulaire* pe *centro-acinaire*) ma vez anafet ar c'horrvronkez, hag int isvollek alies, ha salv ar c'horrwazhied, alese bezañs ur gwered heptreug muiek, hag an *emfizem hollhoginel* (Gl. *e. panlobulaire* pe *panacinaire*) o tizhout war un dro ar c'horrvronkez analadel, san ha sac'h al logigoù ha war un dro rouedad ar c'horrwazhied, ar gwered heptreug o chom bihan pe ezvezant.

empirique ◇ **1 empirical 2 empirical, empirically** ◇ **1 kantouiziat aa. 2 kantouiziad g. -ed, pareour g. -ion** 1 O tiazazañ an embregerezh war ar c'hantouezañ hep amoug an hentennoù skiantel, termen arveret dreist holl e-keñver ar pleustroù mezegel. 2 Embreger kantouiziat.

empirisme ◇ **empirism, empiricism** ◇ **kantouiziadezh b.** Pleustroù mezegel diazezet war ar c'hantouezañ hep amoug an hentennoù skiantel.

NOTENN : Ne veneger ket amañ *empirique* hag *empirisme* er sterioù o deus an termennoù-se e lavar ar Brederouriezh.

emporiatricie ◇ **emporiatrics** ◇ **emdizhouriezh b.** Diskiblezh vezegel o plediñ gant anaizioù ar veajourion.

empreinte ◇ **print** ◇ **louc'had g.** 1 Merk lezet gant ar bized war an traoù (sl. *dactylogramme*). 2 Ginstumm an dent ha diabarzh ar genoù graet dre skuilhañ un danvez liñvel o sonnañ e diastok ar gwiadoù ; leuniet gant plastr, e pourchas al louc'had un haneilad feleun eus an dentadur hag eus ar gwiadoù nes.

emprothotonos ◇ **emprothotonos** ◇ **emprostotonoz g.** Seurtad dargrezad hollek muiek er c'higennoù pleger a stader e degouezhioù a 'n tetanoz ; emdamolodiñ a ra ar gouziviad evel ur grouell er grozh.

empyème ◇ **empyema** ◇ **linoglad g.** Hogennad lin en ur gavenn naturel, sk. *linoglad kev ar garvan, linoglad ar c'hrezoù*.

émulsifiant ◇ **emulgent** ◇ **1 livrizhus aa. 2 livrizhuzenn b.** Gwezher danvezet er bouederezh evit amparañ ha mirout an livrizhennoù.

émulsification ◇ **emulsification** ◇ **livrizhañ** Araezad bouederezh, lakaat un aozad e rezh livrizhenn.

émulsion ◇ **emulsion, emulsio** ◇ **livrizhenn b.** Angevezh diwar strewiñ ul liñvenn e-barzh ul liñvenn all anvesk ganti, a zeskriver evel trevnad fizikel daou arvez : an eil, kendalc'hek, lavaret *en arc'hronn* pe *arc'hronnenn*, egile o c'hoarvezout a dakennnoù munut en arlug, ankendalc'hek enta, lavaret *en arc'hoal* pe *arc'hoalenn* ; kemm a lakaer etre daou rizh livrizhennoù : al *livrizhennoù eoul en dour* (E/D, Gl. H/E, Sz. O/W) hag al *livrizhennoù dour en eoul* (D/E, Gl. E/H, Sz. W/O).

émulsion photographique ◇ **photographic emulsion** ◇ **livrizhenn luc'hgizidik** Arlugenn o c'hoarvezout a haliou argant er stad strinkel en arc'hoal e-barzh gelatin a lifrer tanav ganti ur gousol sonnel.

émulsionner ◇ **emulsify** ◇ **1 livrizhennañ 2 livrizhañ** 1 Azdodiñ ul livrizhenn d'ul liñvenn. 2 Lakaat e rezh livrizhenn.

évanthème ◇ **enanthem** ◇ **enanthem** g. Dispuilhad lec'hiet war ur glaourgenn (sl. *exanthème*).

énarthrose (TA articulatio spheroida) ◇ **enarthrosis, spheroid joint** ◇ **kenvell** g. **boullek** Kenvell a zo pellennek unan eus e dalbennoù.

encéphale ◇ **brain, encephalon** ◇ **mel** g. **penn** Darn uhelañ an nerved endalc'het gant ar c'hlopenn, anezhi an empenn, an ilpenn hag ar c'hef empenn (sl. *cerveau, diencéphale, mésencéphale, myélocéphale, prosencéphale, rhombencéphale, télencéphale*).

encéphalite ◇ **encephalitis** ◇ **melpennfo** g., **empennfo** g. Tanijenn eus ul lodenn bras pe vrasoc'h eus ar mel penn, a c'hell bezañ a orin bakteriel, arvevadel, foueel, viruzel pe allergek; kentael pe eilvedel d'un anaez hollek; dredat pe kevret gant tizhad ar pilhon.

NOTENN : Ar boaz eo e galleg hag e saozneg arverañ an un termen evit arouezañ diziforc'h tanijenn ar mel penn ha tanijenn an empenn ent strizh (sl. *cérébellite*).

encéphalite aiguë post-infectieuse de l'enfance ◇ **post-infection encephalitis** ◇ **empennfo dianbore** Empennfo lemm anlinus o tarvezout e bogvezh pe e souzvezh holl boreoù ar vugale : ar vuvrec'h dreist holl, met ivez an difteriezh, ar ruzell, an drev, h.a.; lies furm dezhañ : gliziel, seziel, skiantennel pe vredel, o parañ a-wechoù, o lezel alies arlenadoù trebadek evel an droukfell, disleberadur ar bred, al ledseizi dasstrizhek.

encéphalite de Saint-Louis ◇ **St-Louis encephalitis** ◇ **empennfo SaintLouis** Empennfo broreuziat ha darreuziat e koskorvaz ar Misisipi, e Reter hag e Krenngornog ar Stadoù Unanet, kiriek dezhañ un arboviruz a stroll B (renket bremañ er Flaviviruzoù) treuzkaset gant ur moustik, an evned o vezañ mirva ar viruz; deraouiñ a ra dre an derzhienn, laur ar c'higennoù; goude un didorr berbad ez adkrog feuls an derzhienn kevret gant kloppnadoù taer, morgud, kefroù, dargrezadoù, krenerezh; a-wechoù marvus, peurliesañ e tedro gorrek d'ar pare hep arlenadoù.

encéphalite épidémique d'Economo-Cruchet, encéphalite léthargique, encéphalomyélite diffuse, névralgie épidémique ◇ **lethargic encephalitis, Economo's disease, epidemic encephalitis, epidemic neuraxitis, nona** ◇ **kleñved von Economo, empennfo morganvus, empennfo darreuziat, empennmelfo strewek, nervahelfo darreuziat** Pore deskrevet e 1917 ha steuziet e 1925, darreuziat pe skignek, o tizhout ar c'hrennempenn dreist holl hag oc'h emastenn a-wechoù d'ar mel ha d'an nervennoù trobarzhel; ent klinikel e veze notet terzhienn, morvor, seizi nervennoù loc'hañ al lagad, laurioù berius ha kridoù, strafuilhoù bred; etre 30 ha 40 % edo feur ar varvusted; pa baree, e tisoc'he gwechoù 'zo goude un didorr hir pe hiroc'h gant kleñved Parkinson; gwezher ar c'hleñved oa ur viruz nervgerc'h nes da viruz an eror.

encéphalite équine américaine ◇ **American equine encephalitis** ◇ **empennfo marc'hel amerikan** Anvad rumm evit ur stroll empennfoioù a 'r c'hezeg, reoù anezho o tredizhañ an dud; tri seurtad anezho : an e. *marc'hel a rizh Kornog*, a c'hoarvezas ar pennañ darreuziad denel anezhañ e North Dakota e 1941, gantañ strafuilhoù grevus : terzhienn, strafuilhoù nerval (koma), arlenadoù loc'hadel ha bredel, treuzkaset gant ar moustiked, ar mirva o vezañ ar c'hriagnered hag an evned emdizher; an e. *marc'hel a rizh Reter* hag an e. *venezuelat*, na dizhout nemeur an dud.

encéphalite japonaise ◇ **Japanese encephalitis** ◇ **empennfo japanat** Seurtad empennfo darreuziat stadet e reter Azia, kiriek dezhañ un arboviruz a 'r stroll B renket bremañ er Flaviviruzoù; dedreñ a ra ent klasel evel empennfo Saint-Louis hervez daou lankad, poreel ha pilhonempennel; piaouel dezhañ eo muiegezh ar strafuilhoù bred hag an dargrezadoù ha grevusted an arlenadoù bredel ha loc'hadel (azoniad parkinsonek).

encéphalite primitive à virus ◇ **primary viral encephalitis** ◇ **empennfo viruzel kentael** Anvad a lakaer war an empennfoioù dibar diwar ur viruz hennadet : viruz ar gonnar, enteroviruz (viruz kleñved Heine-Medin, viruz *Coxsackie*, ECHO), arboviruz (stroll A renket er genad *Alphavirus*, stroll B renket er genad *Flavivirus*) (sl. *arbovirose, echovirus, encéphalite virale*).

encéphalite pseudo-tumorale ◇ **tumor-like encephalitis** ◇ **empennfo gaouyoc'hennel** Seurtad empennfo a zo e azonoù heñvel ouzh re ur yoc'henn empenn : barradoù droukfell, kloppnadoù, c'hweladoù, strafuilhoù lagadel, bredel, ilpennel, kelc'h-strishaerel.

encéphalite traumatique, démenace traumatique, démenace des boxeurs, syndrome de Homen ◇ **dementia pugilistica, punch drunk** ◇ **empennfo daraezel, empennfo ar vokserion, envedi b. daraezel, envedi ar vokserion** Teskad anadennoù nerval a stader gant ar vokserion a vicher, anezho un dizampartiz war washaat, digenurzh ar fiñvoù, krenerezh, a-wechoù reuter, migevaot ha divig kefredel; gorrek hag argreskus eo an dedreñ.

encéphalite virale ◇ **viral encephalitis** ◇ **empennfo viruzel** Empennfo diwar viruz, pe kentael (sl. *encéphalite primitive à virus*), pe eilvedel d'un tizhad viruzel emaez an nerved : jotorell, grip (*Mixovirus*), eror (*Herpesvirus*, paotañ gwezher an e. *viruzel* en Europa), senkl, brec'h nij, ruzell, ruzig, h.a.); viruzoù (an *Herpesvirus*) a vez o wazhañ war eun kelligoù an empenn, viruzoù all o werediñ dre ur wikefre hangaeel a rizh dreistkizidigezh daleet (da skouer, an empennmelfo lemm strewek); ekichen an empennfoioù diwar viruzoù hennadet e renker empennfoioù dianav c'hoazh o viruz pe gousellet hepken an arbenn viruzel anezho.

encéphalocèle ◇ **encephalocèle** ◇ **empennogad** g. Ezlec'h un darn eus an empenn pe eus ar goloennoù anezhañ diouzh talbenn diavaez ar c'hlopenn, kammneuziad del pe diandaraez; pa c'hoarvez an ogad a wiad nerval stank e komzer eus *encefalom* (Gl. *encéphalome*).

encéphalographie ◇ **encephalography** ◇ **empennluniñ** Skinluniñ an empenn goude ensinklañ en erlec'h ouzh al liñvenn benn-kein pe un aezhenn (*empennluniñ aezhennel*, Gl. *encéphalographie gazeuse*), pe ul liñvenn (*empennluniñ liñvennel*, Gl. *encéphalographie liquidienne*), daou araезд diletet hiziv e gounid ar skinerluniñ hag ar skeudennerezh dre zasson gwarelle (SDG).

encéphaloïde ◇ **encephaloid** ◇ **empennvanek** aa. A-zivout ar yoc'hennoù ganto neuz ha kantalc'h an empenn, sk. : *sarkom empennvanek*, *kankr empennvanek ar skevent*.

encéphalomégalie ◇ **megalencephalon** ◇ **keurempennegezh** b. Usteñv bloc'hek eus an empenn diwar ur glioblastoz pe ur gliomatoz strewek.

encéphalomyélite ◇ **encephalomyelitis** ◇ **empennmelfo** g. Tanijenn an nervahel naouus dre ur c'hlopennad, reuted ar c'hilpenn ha strafuilhoù gweledel, bredel ha loc'hadel, stadet a-wechoù e souzvezh terzhiennoù dispuilhat 'zo, o tedeññ hogos bepred d'ar pare hep arlenadoù.

encéphalomyélite aiguë disséminée, encéphalomyélite périveineuse ou post-infectieuse ◇ **acute disseminated encephalomyelitis** ◇ **empennmelfo lemm eskantet, empennmelfo dianbore** Kleñved o teraoññ trumm dre ur resmiad a neuz poreel gant koabrennegezh, barradoù droukfell hag un teskad azonoù oc'h erzerc'haat anafoù diseurt sezet e meur a lec'h war an nervahel : empenn, krennempenn, hirvel, nervennoù a-glopenn, mel; naoued grevus a hañval emplegañ dizurzhoù hangaeel a-geñver gant un argerzh dreistkizidigezh daleet ma erwez al limfokit T ouzh ar mielin; delanket e vez gant un anaez viruzel (ruzell, ruzig, brec'h nij, senkl, jotorell, mononukleoz poreel), ur vaksinadenn, ur c'hleñved allergik ha kemeradur liaoù 'zo.

encéphalopathie ◇ **encephalopathy** ◇ **naoued** g. **empenn, empennaoued** g. Anvad rumm evit tizhadoù neuziadurel grevus eus an empenn o tarvezout da heul poreadoù, pistriadoù (alkool, plom), daralladoù eus ar stad hollek.

encéphalopathie alcoolique ◇ **alcoholic encephalopathy** ◇ **empennaoued alkool** Anvad rumm evit lies azoniad empennel diwar negezh ar vitamin B₁ dianlen d'an alkoolegezh : empennaoued Gayet-Wernicke, kleñved Marchiafava-Bignami, azoniad Korsakoff.

encéphalopathie bismuthique ◇ **bismuth encephalopathy** ◇ **empennaoued bismutel** Pistriadur a staded dreist holl gant gouzviaded ar c'holonfo bet prederiet bloavezhioù pad gant halioù bismut; goude un deroù manguñv azonet gant strafuilhoù koazhadel, klopennadoù, tolem, krenerezh e-doug un nebeut sizhunvezhioù, e tarvez trumm un daolenn glinikel grevus : kridoù padek gant grezvarroù muiek en izili krec'h, arluzegezh, migevaot, direizhoù an diasav; a-walc'h da parañ eo paouez euvriñ ar bismut.

encéphalopathie hépatique, encéphalopathie porto-cave ◇ **hepatic encephalopathy** ◇ **empennaoued avuien, empennaoued porzh-kav** Seurtad rakkoma ha koma avuien o tarvezout e-kerz kirroz an avu, alies argizus hag adfeilhus, a zispleger pe evel dianlen ar gwered war an empenn eus an amoniak dilaosket er wazhienn gav izelañ, pe dre un heptreug porzh-kav, pe dre skorted arc'hwelel an avu (sl. *coma hépatique*).

encéphalopathie hypertensive ◇ **hypertensive encephalopathy** ◇ **empennaoued uswaskien** Erzerc'had empennel, alies feuls ha dramaek, an uswask talmerel yud : klopennad brevus, dispislec'h, o saezhenniñ adalek ar c'hilpenn, kevret a-wechoù gant c'hweladoù, barradoù droukfell hollek hag an dedreññ trema ur c'homa marvus; gwikefre ar strafuilhoù eo devoudadur un uswask enklompennel, gouliñ an empenn hag alies gwadliñvoù fennigaouek; heñvel eo an daolenn glinikel ouzh hini ur yoc'henn empenn.

encéphalopathie infantile ◇ **infantile encephalopathy** ◇ **empennaoued ar vabaned** Stern nozografek ma voder an azoniadoù nerval a zeroù kontrat hag a zedro henek, diwar geuziadoù o wazhañ an empenn en enkrozhevzh, da geñver ar c'hanedigezh hag e-kerz mizvezhioù kentañ an hoali, da arbennoù dezho an isvec'h oksigen, ar gwadliñvoù, ar viruzoù (ruzig ar vamm), an arvevaded (toksoplasmou), an digempad krouell-mamm (*Rhesus*), diabet ar vamm; diwar anafoù kleizennel trebadek e tinod strafuilhoù nerval ha bredel : ledseizi mabanel, kleñved Little kevret gant dargrezadoù ampikernennek, atetoz, droukfell, nammoù al lavar, ar gweled hag ar c'hleved, dilañsoù kefredel ha kantaazel.

encéphalopathie respiratoire ◇ **respiratory encephalopathy** ◇ **empennaoued analadel** Teskad ar strafuilhoù nerval ha bredel devoudet gant oloksigen an empenn e-kerz ar skorted analadel lemm : klopennad talmus, daralladur ar genskiant o vont eus ar vorvor d'an arluzegezh ha d'ar c'homa, fiñvadoù anreol (dispafalad); azoniadoù o tiscoc'h eus digevassav trumm ur skorted analadel henek gant ur poread bronkez, ur bruskaezhad emdarzh, enfraouiou skevent pe ur fazi mezegadel (oksigengurañ reñverek, diounit gouzizerion an nergve kreiz pe troazhusvorc'herioù).

encéphalopathie subaiguë spongiforme transmissible ◇ **subacute transmissible spongiform encephalopathy** ◇ **empennaoued goulemn spouevanek treuzkasadus** Anvad evit ur stroll klañvadurioù a 'n nergve kreiz naouus *ent neuziadurel* dre dizhadur dic'henezhadur ar steuñvenn louet gant rouezidigezh an neuron, glioz, astrokitoz ha spongioz e dianlen vakuolekaat kitoplasm an neuron ha kelligoù an neuroglia; ne noter nag erwez foel na darallad ebet ar gwazhied; skañv e vez tizhadur ar steuñvenn wenn; er stroll anaезioù-se e renker : *krenion an deñved* (18t kantved), *empennaoued al lourelled* (1965), *empennaoued spouevanek ar bioù* (ESB, 1986) ha, gant an dud, ar c'*hourou*, *kleñved Creutzfeldt-Jakob*, *azoniad Gertsman-Sträussler-Scheinker*, an *anhun feudek familhel*, klañvadurioù ar re-se holl naouus *ent klinikel* dre erzerc'hadoù nerval hag un dedro gorrek marvus; ne vez ganto erwezhangaeel ebet, nemet e vez paot en empenn ur protein amiloidel ezreol (ar PrPSc); ar gwezher kleñvedus n'eo ket ur viruz gorrek evel ma c'houlakaed, met ur protein (ar prion).

encéphal-

- *anencéphalie, encéphalo-araphie* empenn-andlid • *anencéphalomyélie* empennmelandlid • *atérencéphalie* empennanelouer
- *blépha-rosplasme postencéphalitique* malvenndag dianempennfo • *encéphalo-araphie* empenn-andlid • *mort encéphalique* marv a 'n empenn • *rhinencéphale* fronempenn • *syndrome postencéphalitique* azoniad dianempennfo • *syndromes parkinsoniens et postencéphaliques* azoniadoù parkinsonek ha dianempennfo • *télencéphale* peurempenn.

enchaîner

- *enchaîner couramment et distinctement les phonèmes* kemalañ riel ha fraezh ar mouezhiadoù.

enchatonnement placentaire ◇ **incarceratio placentae** ◇ **azgannad g. torzhienn** Darvoud ar gweleskar, azdalc'h un tamm torzhienn tagellet gant ur walenn dargrezañ (peurliesañ e-barzh korn ar grozh) war var da zec'han gwadliñvoù ha da rekizañ ur gweleskar kalvezadel.

enchevillement ◇ **pegging** ◇ **enibiliañ** 1 Sankañ ur c'harenn dir pe un imboudenn askorn e-barzh kavenn vel un askorn torret evit kengovliñ ha diloc'hekaat an tammoù en o lec'h reol. 2 Diloc'hekaat ur c'henvell dre sankañ un imboudenn a-dreuz d'an daou dalbenn kenvellañ (sl. *clou, coaptation, enclouage*).

enchondr-

- *enchondrome* enkondrom • *ossification enchondrale* askornaat enmigornel.

enchondromatose ◇ **enchondromatosis** ◇ **enkondromatoz g.** Mideñv hêrezhel ar migern, naouus dre ar vezañs eus enezigoù kondromatus e-barzh ardalpennoù an eskern, untu alies, o tec'han argrommadurioù ha berradurioù an eskern hir (sl. *chondrody-strophie*).

enclavement ◇ **enclavement** ◇ **1 kouboulad g., kouboulañ 2 3 ambac'had g., ambac'hañ** 1 Azderc'hel e-barzh un organ, ur ganol, ur gwiad, sk. : *grouanenn kouboulet er san vestil* 2 (*ambac'had ar grozh*, Gl. *enclavement de l'utérus*) darvoud ar vrazedded pa vez ar grozh drekc'hwelet ha klaviet el lestr bihan ma amwask organoù ar rannbarzh ha ma tec'han strafuilhoù o arc'hwelerezh 3 (*ambac'had ar penn*, Gl. *enclavement de la tête*) e-kerz ar gwilioudiñ, azivout penn ar grouell ur wech enanket, chom gennet en digor krec'h e doare ma ne c'hell mui na diskenn na bezañ disvountet.

enclouage ◇ **pegging** ◇ **enklaviañ** Arverañ tachoù a sanker e-barzh tammoù un askorn torret evit o c'hengovliñ hag o diloc'hekaat (sl. *clou, enchevillement*).

encopresie ◇ **encopresis** ◇ **kaoc'handalc'h g., argaoc'hañ** Leuskel andiarvenn an oulennoù (sl. *énurésie*).

endapexien ◇ **endapexian** ◇ **enlezkernel aa.** Loet a-ziabarzh da gern ar galon.

endartère, intima ◇ **endarterium** ◇ **entalmerenn, intima b.** Sae diabarzh (ensae) un dalmerenn.

endartér(i)ectomie, endartér(i)ectomie désoblitérante, thrombo-endartériectomie ◇ **endarter(i)ectomy** ◇ **entalmer-ennzevenañ azforzhekaat** Gwezh surjaniel amkanet da barraat ouzh an talmerennfo stevius : digeriñ a reer an dalmerenn war hed ar rann steviet, dazbidañ an trombuz a-ser gant parzhioù marvennet ha dic'henezhet ar saeoù bet englenet ouzh ar gaouledenn (eleze an ensae, darnoù ar grennsae, a-wechoù betek al lavnenn venennus diavaez) ha krafaelañ brielloù an enbenadenn.

endartérite ◇ **endarteritis** ◇ **entalmerennfo g.** Tanijenn ensae an talmerennoù, kenezant alies gant tanijenn ar saeoù all ; war an talmerennoù bihan eo e stader an anafoù brasañ, gant tevadur muiek an ensae hag anforzhekaat.

endémicité ◇ **endemicity** ◇ **1 broreuziadegezh b. 2 broreuziadelezh b.** 1 Perzh bezañ broreuziadek. 2 Bezañ a-zave d'ar broreuziañ.

endémie ◇ **endemia** ◇ **broreuziad g., broreuziañ** Bezañ trebad en ur vroezenn eus ur c'hleñved lavaret oc'h erzerc'hañ a-gendalc'h pe a-vareadoù.

endémique ◇ **endemic** ◇ **broreuziat aa., broreuziadek aa.** O vroreuziañ, en araez da vroreuziañ.

endo-urétral, transurétral ◇ **endourethral** ◇ **tregantroazhel aa.** Dre hent ar c'han troazh, a-zivout ur gwezh surjaniel ameilet dre luc'hwereañ, sk. : *dazbidañ tregantroazhel ar raksavenn*.

endocarde ◇ **endocardium** ◇ **enkalonenn b.** Sae diabarzh ar galon, o c'holeiñ ar c'havennoù hag oc'h amparañ an trapigoù ; a-gendalc'h emañ gant endotelienn ar gwazhied bras.

endocardectomie ◇ **endocardectomy** ◇ **enkalonnenzevenañ** Dazbidañ an enkalonenn, prederiadur surjaniel an enkalonnenno fibroplastek.

endocardiaque ◇ **endocardiac, endocardial** ◇ **enkalonel aa.** A-zave d'an trouzoù ha d'an anadennoù all o c'hoarvezout e-barzh kavennoù ar galon.

endocardique ◇ **endocardiac, endocardial** ◇ **enkalonnenel aa.** A-zave da sae diabarzh ar galon.

endocardite ◇ **endocarditis** ◇ **enkalonnenno g.** Tanijenn an enkalonenn ; hervez he lec'hiadur e reer anv eus *e. trapigel* (Gl. *e. valvulaire*) pe eus *e. speurel* (Gl. *e. pariétale* pe *murale*).

endocardite abactérienne thrombosante, thromboendo-cardite ◇ **abacterial endocarditis** ◇ **enkalonnenno anvakteriel trombozus** Enkalonnenno trombozus a neuz poreel ma chom nac'hek ar gwadtiñvañ, stadet e-kerz poreadoù hag anaeziou falezhus.

endocardite bactérienne ou infectieuse ou infectante ou ulcéreuse ou végétante ◇ **infectious or infective endocarditis** ◇ **enkalonnenno bakteriel pe poreel pe poreüs pe angreizhek pe struzhennek** Pore diwar an tremen er gwad eus

bakteri diseurt (strepokok, stafilokok, h.a.) pe, e troioù dibaot, eus foue pe eus govevion, a ya da lec'hiañ war an enkalonnenn e par an trapigoù ma tec'hantont anafoù angreizhek ha struzhennek ha, da heul, enfraouioù ha skorted kalon.

endocervical ◇ **endocervical** ◇ **engouzougel** aa. A-zave da ziabarzh gouzoug ar grozh.

endocervicite ◇ **endocervicitis** ◇ **engouzoufgo** g. Tanijenn glaourgenn kanol gouzoug ar grozh (sl. *cervicite*).

1 endocrine **2 endocrine, endocrinien** ◇ **1 endocrine** **2 endocrinous** ◇ **1 enborc'hat** aa., **enborc'hañ** **2 enborc'h-adel** aa. 1 A-zivout ur wagrenn o tilaoskiñ he dedaolad war eeun er gwad. 2 A-zave d'an enborc'hañ, sk. : *azoniad enborc'hadel* (Gl. *syndrome endocrinien*).

endocrine ◇ **internal secretion** ◇ **enborc'hañ** Arc'hwel bevedourel gwiadoù 'zo, anezhañ dedaoliñ danvezennoù a vez dilaosket er gwad.

endocrinologie ◇ **endocrinology** ◇ **enborc'honiezh** b. Skiant a zo he amkan studiañ korfadurezh, bevedouriezh ha kleñved-ouriezh ar gwagrennoù enborc'hañ hag an hormonou.

endocrinopathie ◇ **endocrinopathy** ◇ **enborc'hanaez** g., **enborc'hnaoued** g. Klañvadur ar gwagrennoù enborc'hañ.

endocytose ◇ **endocytosis** ◇ **endokitoz** g. Anvad rumm evit kement argerzh ebarzhiñ er gellig eus danvezennoù an amva (degerc'hañ, enteñ) (sl. *exocytose, phagocytose*).

endoderme, endoblaste, entoblaste ◇ **endoderm** ◇ **endoderm** g. Feilhenn diabarzh ar blastoderm a emdroy da amparañ epitelienn c'holeiñ hag epitelienn wagrennel an darn vrasañ eus ar benvegadoù koazhañ hag analañ, ar raksavenn, ar c'hwezbigell, ar skoedenn, an arskoedenn, h.a.

endodonte ◇ **endodentrium** ◇ **endantenn** b. Bouedenn an dant (sl. *desmodonte*).

endodontie ◇ **endodontia** ◇ **endantennouriezh** b. Skourr an dentouriezh o plediñ gant klañvadurioù ar vouedenn hag ar c'hleuzennoù dent.

endoenzyme ◇ **endoenzyme** ◇ **endoenzim** g. Enzim a zo diabarzh ar gellig load e werederezh.

endofibrose artérielle ◇ **arterial endofibrosis** ◇ **endofibroz** g. **talmerel** Anaez ar rederion varc'h houarn, naouus *ent wiadurel* dre devadur stirek, trogelc'hiek pe get, an intima; *ent korfadurel* dre lec'hiañ an anaf war an dalmerenn a-glun diavaez darhedet da geñver ar c'hambliañ war un treug kammdroek; *ent klinikel* dre ul laur peluzus eus ar vorzhed muiaet dre ar c'hambliañ; er paouez ez eo reol an daolenn glinikel, nemet e teu a-wel gant an talmerennluniñ un isvroll hedek eus an dalmerenn; c'hoarvezout a ra ar prederiadur a verraat ar wazhiedenn dre dalmerennezvenañ.

endogène ◇ **endogenous, endogenic** ◇ **1 endeuat** aa. **2 endogen** g. **-où** 1 A zo e orin er bevedeg. 2 (Kurzhad diwar Sz. *endoantigen*) danvezenn dec'hant e-barzh ar bevedeg da geñver poreadoù 'zo, dezhi perzhioù an antigenoù; outo e tedaol ar bevedeg antikorfoù, an *antiendogenoù*.

endognathie ◇ **maxillar or mandibular contraction** ◇ **avenisled** g. Strizhded un pe an div aven (*karvanisled, gavedisled*) (sl. *allélognathie, brachygnathie, exognathie*).

endoluminal ◇ **endoluminal** ◇ **enoaledel** aa. A-zave da ziabarzh ur ganol pe ur wazhiedenn.

endolymph ◇ **endolymph** ◇ **endourenn** b., **endolimf** g. Liñvenn bezant er milendall lienennek.

endolymphite ◇ **endolymphangitis** ◇ **endolimfangit** g. Tanijenn endotelienn gwazhied al limf, stadet er filariaz.

endomètre ◇ **endometrium** ◇ **enkrozhenn** b. Glaourgenn ar grozh.

endométrial ◇ **endometrial** ◇ **enkrozhennel** aa. A-zave da c'hlaourgenn ar grozh.

endométrioïde ◇ **endometrioid** ◇ **1 enkrozhvanek** **2 endometriom** g. 1 A-zivout glaourgenn korzennoù ar grozh aet unrezh da c'hlaourgenn ar grozh. 2 (sl. *endométrioïde*).

endométrioïde, endométrioïde, solénome, adénomyome utérin ◇ **endometrioma** ◇ **endometriom** g. Seurtad endometrioz nozelek kantet, pe enkloz e-barzh ar c'haher krozh, pe e rezh ur polip ebarzh kavenn ar grozh; yoc'henn guñv o tinodiñ bepred gant maouezed en o hoal ganadel, anezhi elfennoù bonan gouskoev eus glaourgenn ar grozh; endometriomoù allec'hiat a stader a-wechoù war ar pervez, dibaot tre war ar c'hwezbigell, ar begel, ur gleizenn, h.a.

endométriose ◇ **endometriosis** ◇ **endometrioz** g. Diwan en ul lec'h divoas eus gwiaed enkrozhennel reol e rezh ur glaourgenn gant e donenn, e wagrennoù hag a-wechoù kaherwiennoù levñ; sezañ a ra peurliesañ war gorf ar grozh ma sank bogodoù bihan er c'haher, met ivez dindan an ampeleñ, war gorzennoù ar grozh, e-barzh ar stagell ledan, ar vierrez, ar youlc'h ha zoken er ganol vezhur, er c'hroc'hen; erwezhiñ a ra hevelep glaourgenn krozh ezlec'hiat ouzh an annozadoù hormonel.

endométrite ◇ **endometritis** ◇ **enkrozhennfo** g. Tanijenn glaourgenn ar grozh; kemm a lakaer etre an *enkrozhennfo kistek* (Gl. *endométrite kystique*) ma stader kistoù bihan a-strew war ar glaourgenn hag an *enkrozhennfo gwadliñvek* (Gl. *endométrite hémorragique*) naouus dre zireizh ar c'hor miziaouel, an diwadoù o vezañ ezreol en o aliested, o fadelezh, o fonnded; emañ e dianlen an usvorc'h follikulin o tevoudañ uswe gwagrennoù an enkrozhenn.

endomysium ◇ **endomysium** ◇ **enkaherenn** b., **endomiziom** g. Kennenn genglenel o c'hronnañ pep gwienn gaher rizennek (sl. *épinysium, périnysium*).

endonèvre, gaine de Henle ◇ **endoneurium** ◇ **ec'haksonenn** b., **endoneurion** g., **feur** b. **Henle** Feur genglenel en dro da bep akson e-barzh un hordenn nervel (sl. *épinèvre, neurolemme, périnèvre*).

endonucléase ◇ **endonuclease** ◇ **endonukleaz** g. Seurtad enzimoù (hidrolazoù) ganto ur gwered dourrannañ e-barzh un arrevell nukleotidoù; reoù anezho zo enzimoù argrennañ (sl. *génétique : système de restriction-modification* ~).

endoparasite ◇ **endoparasite** ◇ **enarvevad** g. -ed Arvevad struzhel pe loenel o trigañ e diabarzh ar bevedeg (kanol vezhur pe an adparzhioù anezhi, gwazhiadurezh, kaherioù, h.a.), sk. : tenia, filar, plasmodiom (sl. *ectoparasite*).

endoparasitose ◇ **endoparasitosis** ◇ **enarvevadegezh** b. Anaez diwar enarvevaded.

endopeptidase, protéase ◇ **endopeptidase** ◇ **endopeptidaz** g. Seurtad enzimoù proteolitek (hidrolazoù) ganto ur gwered war an digorvelloù peptidek; an endopeptidaz neptu (Gl. *endopeptidase neutre, Sz. neutral endopeptidase, NEP*) a zispenn ar peptidoù natriomdroasheiat.

endophasie ◇ **endophasia** ◇ **derc'hluzañ** Deluzañ dec'hmeget, lavar hanterhent etre devezout aneztaol hag eztaoliñ.

endophlébite ◇ **endophlebitis** ◇ **engwazhiennfo** g. Tanijenn ensae ar wazhienn.

endophtalmie ◇ **endophtalmitis** ◇ **enlagadfo** g. Tanijenn endalc'had al lagad.

endoplasmique ◇ **endoplasmic** ◇ **endoplasmek** aa. A-zivout an elfennoù danzeet gant ar gellig ha bezant er protoplasm, dizisrann pe kantet e-barzh loganoù hevonnn.

endoprothèse ◇ **endoprosthesis** ◇ **1 enosodiñ 2 enosod** g. **3 stent** g. 1 Enstudañ ent trebadek un dafarenn metal pe mezell e-barzh ar bevedeg en erlec'h ouzh un askorn, ur c'henvell, ur wazhienn, un dalmerenn pe un trapig kalon. 2 Ar pezh enstuded e unan; enosodoù 'zo a ensezler dre gateteriñ e diabarzh kanolioù (talmerennoù, forzhioù koazhadel, analadel, troazhadel) e sell da gemmirout o c'havnez. 3 Sz.Gl.Br. *stent* a reer eus an enosodoù gwazhiedel, ar re a ensteuder en talmerennoù kuruner pergen; ar *stent gwisket* (Gl. *endoprothèse couverte, Sz. stent-graft*), ouzh e ober un atel metal goloet gant un danvez arbennik, ar wiadenn osodel, a arverer da brederiañ an darvolloù talmerel; ar *stent lindret* pe *stent gwezhus* (Gl. *endoprothèse active, Sz. active stent, drug-eluting stent*) zo anezhañ un enosod kurunerel gwisket gant un danvezenn lael war zilaoskiñ gorrek (sl. *angioplastie, stent, stentless*).

endoradiothérapie, endoröntgénéthérapie ◇ **endoradio-therapy** ◇ **enskingurañ** Arloañ ar skingurañ ouzh an organoù don dre araez ardivinkoù arbennik ebarzhet er c'havennoù naturel (garloc'henn, gouin, youlc'h).

endorphine ◇ **endorphine** ◇ **endorfin** g. Anvad rumm evit danvezennoù polipeptidek bezant e parzhioù 'zo eus an nerveizhiad, dezho ur gwered dislauriñ hirbad; lenañ a reont ouzh buzerioù morfinel kreizennoù al laur — alese an anvad all a roer dezho : *morfinoù endeuat* (Gl. *morphines endogènes*) (sl. *enképhaline, neuropeptide, récepteur morphinique*).

endoscope ◇ **endoscope** ◇ **endoskop** g. Ardivink luc'hwerañ o c'hoarvezout eus ul luc'honi (trevnad c'houlouañ) hag un trevnad enselliñ (peurliesañ ur feskenn edañvoù kouarz, *endoskop edañvek*, Gl. *endoscope à fibres*) (sl. *fibroscope*).

endoscopie ◇ **endoscopy** ◇ **luc'hwerañ, luc'hengweliñ** Arselliñ speurioù un organ kleuz gant un endoskop ebarzhet dre ar forzhioù naturel (bronkez, benvegadoù koazhañ ha troazhañ) (*luc'hwerañ antrewan*) pe dre ur broskan sanket en ul levrgenn (ampeleñ, krezenn, irgenn) (*luc'hwerañ trewan*).

endosome ◇ **endosmosis** ◇ **entreleizhiñ** Red treleizhiñ oc'h enteñ dre ur gennenn handreuz trema ur c'hombod dourennel usgrennek (sl. *exosome*).

endothélial ◇ **endothelial** ◇ **endotelel** aa. A-zave d'an endotelienn.

endothéliome ◇ **endothelioma** ◇ **endoteliom** g. Yoc'henn evodet diwar gelligoù an endotelienn.

endothélium ◇ **endothelium** ◇ **endotelienn** b. Gwiad liac'hek oc'h ober arwiskad diabarzh ar gwazhied, o vorc'hañ danvezennoù gwazhiedwezhus : *prostakiklin, oksidenn nitrek, endotelin, tromboksan*, h.a.

endothrix ◇ **endothrix** ◇ **enblevennat** aa. Lec'hiet e diabarzh ar vlevenn, sk. : *foue enblevennat* (Gl. *champignons endothrix*).

endotoxine ◇ **endotoxin** ◇ **endotoksin** g. Toksin bezant e diabarzh korf ar bakteri Gram— ha na skign ket er meteier tiñvañ (sl. *exotoxine*).

endoveine ◇ **endovenous** ◇ **engwazhienn** b. Ensae (pe intima) ur wazhienn.

endovirus ◇ **endovirus** ◇ **endoviruz** g. -où Retroviruz a zo e c'henom darn- pe beurunrezh gant rannoù 'zo eus genom ar gellig dibore, ostiz naturel dezhañ; un endoviruz piaouel d'ur spesad a c'hell bezañ eksovirus e-keñver ur spesad all (sl. *exovirus, rétrovirus*).

end-, endo-

- *anesthésie endoveineuse* dieraeziñ engwazhiennel
- *biopsie par voie endoscopique* bevsav dindan luc'hengweliñ, bevsav dre hent luc'hweraed
- *bruit du cœur de siège endapexien ou apexien* trouz ar galon enlezkernel pe gernel
- *cataracte endocrinienne* ferennluc enborc'hadel
- *endoscopie du colon, coloscopie* kolonengweliñ
- *effets endocriniens* gweredoù enborc'hadel
- *endodermique, endoblastique* endodermek, endoblastek
- *endothermique, exothermique* gwreztennus, gwreztaloul
- *enzymes endocellulaires* enzimoù enkelligel
- *réaction endo-énergétique* dazgwered gremmdennus
- *sonde endobronchique* sont enbronkezel.

endurance ◇ **endurance** ◇ **kadarni** b. Gouzañvusted ouzh ar skuizhnez, al laur, h.a.

énergamétrie ◇ **energametry** ◇ **niñventerezh** g. Hentenn vuzuliañ al labour graet gant ur gigenn dre unanenn amzer, arveret evit dewerzhañ derez andrafted un ezel, eleze evit desavelañ derez lezennel an dic'housted en arlen d'ur gloazad.

énerg-

- *brillance énergétique, luminance énergétique* gremmsked • *dépenses énergétiques* dispignoù gremm • *éclairage énergétique* gremmc'houlouder • *énergie cinétique* gremm fiñvek • *radiance énergétique, émittance énergétique* gremmgaster gorreel
- *rayons X de haute énergie* skinoù X uhelc'hremm.

énervation ◇ **enervation** ◇ **dinervañ** Dilemel nervenn(où) un organ, ur parzh korf (sl. *dénervation*).

enfance ◇ **childhood** ◇ **bugelvezh g.** Padvezh an hoali etre ar c'hanedigezh hag ar c'hrennoad; e isrannañ a reer etre ar *mabanvezh* (Gl. *petite enfance, bas-âge*) betek daou vloaz, ar *bugelvezh kentañ* (Gl. *première enfance*) etre 2 ha 6 vloaz, an *eil bugelvezh* (Gl. *seconde enfance*) etre 6 ha 12 vloaz; notomp ez eus neuennadurioù etre an aozerion evit isrannañ ar bugelvezh (sl. *âge, courologie, nourrisson, nouveau-né, pédiatrie*).

enfants ébouillantés : **syndrome des** ~ ◇ **scalded skin syndrome** ◇ **azoniad ar vugale skaotet** Dispuilhad eritematus dispelius diwar un toksin borc'het gant ur seurtad stafilokok aourliv; stadet e vez en azoniad Lyell, en azoniad Ritter von Rittershain pe er skarlegenn stafilokokel.

enfants secoués : **syndrome des** ~ ◇ **shaken-baby syndrome** ◇ **azoniad ar vugale hejet** Anafoù a 'n empenn (gwatoñvoù is-tev, gwadliñvoù ar pilhon), a-wechoù a 'n daoulagad, stadet a-raok an oad a zaou vloaz da heul gwallgasadennoù (horelladurioù trumm ar penn en dro da ahel al livenn c'houzoug), o kas d'ar marv pe o lezel arlenadoù grevus.

enflammé ◇ **inflamed** ◇ **tanijennek** aa., **foek** aa. Tizhet gant an danijenn.

enfouissement ◇ **turning in** ◇ **kafunañ** Lankad a 'n dazbidañ war un organ eus ar c'hof, anezhañ krafaelañ div vriell flugezel an ampeleñ evit dlita gorre ar skejad hag e zredañ diouzh ar gavenn gof (termen arveret dreist holl da geñver an ezvenañ divilhenn).

engagement ◇ **engagement** ◇ **enankañ** A-zivout ar grouell e derou ar gwilioud, enteñ en digor krec'h evit diskenn e kavenn al lestr; hervez al lodenn oc'h enteñ da gentañ (an *erload*, Gl. *présentation*), e tiforc'her *erload ar gitern* (Gl. *présentation du sommet*), *erload an tal* (Gl. *présentation du front*), *erload an dremm* (Gl. *présentation de la face*), *erload ar revr* (Gl. *présentation du siège*), h.a. (sl. *dégagement, présentation*).

engagement cérébral, hernie cérébrale ◇ **cerebral herniation** ◇ **empennankad g.** Disvout darnoù 'zo eus an empenn dre igorennoù enklouennel ar bilhonenn dev, anezhañ rouestlad treloc'hel a 'n uswask enklouennel diwar arbennoù lec'hel (gwadliñv, yoc'henn o kreskiñ buan, gwatoñv is-tev daraazel); hervez an igorenn, e tiforc'her 1) an *ankad dindan falc'h an empenn* pe *ankad is-falc'h* (Gl. *engagement sous la faux*, Sz. *subfalcial herniation*), stadet alies e tro gouliñv an empenn, oc'h angorzhañ parzh araoak an hanterennoù empenn, hep grevusted, 2) an *ankad ividig* (Gl. *engagement temporal*, Sz. *temporal herniation*) ma 'z a lodenn draoñ an dolbezenn ividig, linket dre igorenn telt an ilpenn, da amwaskañ kef an empenn, o tevoudañ koma, mabusvoll e tu an anaf, reuter ec'hempenned, ustead kalon, elanal, daskomprad analadel hag alies ar marv diwar gwadliñv e 'r c'hef empenn, 3) an *ankad ilpenn* pe *ankad an huegoù* (Gl. *engagement cérébelleux* pe *amygdalien*, Sz. *tonsillar herniation*), ken grevus all : emsilañ a ra huegoù an ilpenn dre an toull bras o stankañ ode ar pevare kambr hag o strizhañ an hirvel.

engelure, érythème pernio, pernio ◇ **chilblain** ◇ **milher s. -enn, milheriñ** Anaf diwar ar yenion o sezañ er bizied daouarn, treid ha war an dremm, anezhañ ur c'hoevvadur ruz ha laurus, da rouestlodoù dezhañ a-wechoù spinac'henoù ha filboc'henoù.

engorgement ◇ **engorgement** ◇ **anglud g., angludader g., angludañ** Kresk ec'honad ha kantalc'h un organ diwar ma hogenn ennañ ar gwad, ul levruzenn pe al liñvenn borc'het gantañ.

engorger ◇ **to choke** ◇ **angludañ** 1 A-zivout un organ, foeñviñ dre ma hogenn ennañ ul liñvenn (gwad, h.a.), sk. : *angludañ a ra an divvronn goude ar paouez laezhañ*. 2 A-zivout ul liñvenn (gwad, h.a.), hogennañ ebarzh un organ, sk. *goude ar paouez laezhañ e vez al laezh oc'h angludañ an divvronn*.

engouement ◇ **obstruction** ◇ **bouc'had g., bouc'hadur g., bouc'hañ** Tolpadur danvezioù damsonnel o skoilhañ an trehent e-barzh un organ kleuz; termen arveret dreist holl da arouezhiñ chagadur ar mon en ur c'hilbleg pervez ogat, pazenn gentañ eus skoulmadur un avelenn.

enjambement, entrecroisement ◇ **crossing over** ◇ **kroazkemman** Eskemm parzhioù etre daou gromozom kevelep da geñver ar meoz hag a-wechoù ivez e-kerz ur mitoz.

enképhaline ◇ **enkephalin** ◇ **enkefalin g.** Protein a dolz mol izel a ya d'ober, gant an endorfinoù, stroll ar morfinoù endeuat, dezhañ ur gwered enep-laud berrbad (un nebeut munodoù) pa vezont ezniñvet gant an enkefalinazoù; gwerediñ a ra war forzhioù ha kreizennoù al laur (derc'hvel).

enkystement ◇ **encystment** ◇ **enkistañ** Furmiñ ur gwiskad gwiad kenglenel stank en dro d'ur c'horf estren pe un danvez kleñvedel ouzh e zisrannañ diouzh ar gwiaodoù all.

énophtalmie ◇ **enophtalmus** ◇ **dreklagadegzh b.** Loadur ezreol ar voull lagad, donoc'h er pod eget ma vez ent vonan, azon eus anaezioù diseurt, en o zouez terzhiennoù grevus pe beluz plezhad simpatek ar gouzoug.

énorm-

- *délire d'énormité* ambren an derveur.

énostose, endostose ◇ **enostosis** ◇ **enaskornenn b.** Dedaolad o c'hoarvezout peurliesañ a steuñvenn stank evodet diwar gaenn an eskern hir, oc'h aloubiñ kavenn ar mel.

enregistr-

- *bruits enregistrables au phonocardiographe* trouzoù lerc'hwezadus dre ar fonokardiograf • *enregistrement électrique* tredan-

wezañ • *enregistrement graphique* lerc'hwezañ kevregat • *enregistrer les déplacements du corps* lerc'hwezañ dilec'hiadoù ar c'horf • *noter et enregistrer les effets adverses des médicaments* notennañ ha marilhañ miweredoù al liaoù • *système d'enregistrement* trevnad lerc'hwezañ • *tracé enregistré par un ballistographe* krommenn treset gant ur c'halondevannwezer • *tracé obtenu en enregistrant les variations de pression* tresenn lerc'hwezañ argemmadoù ar gwask.

enroul-

• *compresse enroulée sur elle-même* telt roltet.

ensellure lombaire ◇ **lumbar saddle** ◇ **dibregezh b. an dargreiz** Krommadur dregargevek a stader reol gant al livenn dargreiz, o vont reñverek gant ar vrazezded ha stadoù kleñvedel 'zo (yoc'hennoù kofel, torzhellegezh al lez, h.a.).

ensell-

• *ensellure du nez* fri dibrek, dibregezh ar fri.

ensemble

• *ensemble des fréquences des signaux* teskad talmoù an arhentoù • *ensemble administratif* trevnad amaezhel • *ensemble d'informations* teskad stlennadoù • *ensemble de phénomènes toxiques* teskad anadennoù pistriell • *ensemble le plus complet possible* strobad ar c'hlokañ gwellañ • *ensemble organisé* trevnad • *l'ensemble des processus* hollad an argerzhioù.

Entamoeba ◇ **Entamoeba** ◇ **Entamoeba b.** Genad amoeb o trigañ er pervez; spesadoù 'zo anezho n'int ket kleñvedus; *Entamoeba histolytica* a vez kiriek d'an dizenteri ha da bugnezoù (sl. **amibiase, dysenterie**).

entéralgie ◇ **enteralgia** ◇ **pervezost b.** Laur er pervez.

entérectomie ◇ **enterectomy** ◇ **pervezzevenañ** Dazbidañ ur rann eus kanol ar pervez.

entérite ◇ **enteritis** ◇ **pervezfo g.** Tanijenn glaourgenn ar pervez.

entérite folliculaire ◇ **follicular enteritis** ◇ **pervezfo bolc'hennel** Seurtad pervezfo eus ar bugelvezh kentañ, naouus *ent neuziadurel* dre usteñv bolc'hennoù kloz ar pervez hag *ent clinique* dre oulennoù glaourek alies gant strilhoù gwad.

entéro-anastomose ◇ **entéro-anastomosis** ◇ **dasforzhad g. etre-kilblegoù** Kehentaat tu-ouzh-tu daou gilbleg pervez e sell da barraat ouzh un antreizh andire.

entéro-épiplocèle ◇ **enteroepiplocele** ◇ **pervezdanterogad** Avelenn a zo enni kilblegoù pervez hag ur rann eus an danter.

entéro-hépatique : cycle ~ ◇ **enterohepatic cycle** ◇ **kor pervezavuel** Kennevid un danvezenn borc'het e ser ar vestl, dassuget gant ar vouzellenn voan hag o tremen dre an avu en-dro (an halioù bestlel).

Enterobacteriaceae ◇ **Enterobacteriaceae** ◇ **Enterobacteriaceae l. (b.)** Kerentiad bazhilli Gram-, anaerat anret, o trigañ boas e-barzh pervez an den hag al loened.

entéroccèle ◇ **enterocèle** ◇ **pervezogad g.** Avelenn o c'hoarvezout a gilblegoù pervez hepken.

entéroclyse ◇ **enteroclysis** ◇ **pervezolc'hiñ** 1 Gwalc'hiñ ar pervez dre araez ur sont ebarzhet don er youlc'h hag ur mirlestr dalc'het uhel pe uheloc'h hervez ar gwask mennet. 2 Prientiñ ar vouzellenn voan e sell d'ar skinkluniñ dre he demeraat diwar-bouez ur sont lec'hiet en daouzegenn.

entéroccie ◇ **enterococcia** ◇ **enterokokiezh b.** Stad kleñvedel diwar ar poreadur gant an enterokok.

entérocolie ◇ **enterocolitis** ◇ **hollbervezfo g., enterokolit g.** Tanijenn diaser ar vouzellenn voan hag ar vouzellenn dev.

entérocélite mucomembraneuse ◇ **muco-membranous enterocolitis** ◇ **hollbervezfo pe enterokolit glaourliennek** Klaufadur henek ar c'holon naouus dre an triad azonoù : ezvoutad sklerennoù pe brizhliennoù (drailhoù glaourgenn pervez), goustivadur padek ha laurioù kof, alies ivez anadennoù pistriadur, dezhañ arbennoù liesseurt : naoued talmerennoù ar gandedenn, poreadoù diwar *Clostridium difficile* pergen.

NOTENN : Forc'hellek eo arver ar gedrann *enter(o)-* er yezh etrevroadel pa verk a-wechoù ar pervez en e bezh hag a-wechoù ar vouzellenn voan hepken.

entérocélite nécrasante du nouveau-né ou **entérocélite ulcéronécrosante** ◇ **necrotizing enterocolitis of the newborn** ◇ **hollbervezfo pe enterokolit marvennus an nevezc'hanidi** Kleñved grevus o tizhout peurgetket ar rakkoulzeion hag an nevezc'hanidi izil e-kerz an 10 devezh kentañ eus o buhez; oc'h erzerz'hañ dre un dardenn kof, c'hweladoù bestlus, terzhienn ha gwadliñvoù eus ar ganol vezhur; un aezhadezh pervez a weerer dre ar skinkluniñ; c'hoarvezout a ra an anafoù a dachadoù marvenn ledan pe ledanoc'h a-strew war speur ar pervez; etre 10 % ha 40 % emañ ar varvusted, feur o sevel betek 50 % pa zarvez rouestladoù : gwadlestegezh, ampeleñno hag, ar risklusañ holl er palevarzh eus an degouezhioù, treloezadoù; en dro-mañ diwezhañ, e ranker dazbidañ un darn eus ar pervez.

entérocoques, Enterococcus ◇ **Enterococcus faecalis** ◇ **enterokok s., Enterococcus faecalis** Bakteri viheñvel angwad-loezus, o trigañ e-barzh pervez an den bonan, kiriek da boreadoù troazhadel ha da enkalonennfoioù goulemm.

entérocystocèle ◇ **enterocystocèle** ◇ **pervezc'hwezhi-gell-ogad g.** Avelenn a zo enni kilblegoù pervez hag ur rann eus ar c'hwezhi-gell.

entérocystoplastie ◇ **enterocystoplasty** ◇ **c'hwezhi-gell-atelviñ a-bervez** Dazluniañ ar c'hwezhi-gell diwar-bouez ur c'hilbleg eus ar vouzellenn voan pe eus ar c'holon (sl. **colocystoplastie, iléocystoplastie**).

entérocytes ◇ **enterocytes** ◇ **enterokit s.** Kelligoù epitekel eus ar pervez.

entéroïde : **kyste** ~ ◇ **enteroid cyst** ◇ **kist g. pervezvanek** Kist ganedigel, nes-pervez, heñvel e luniad ouzh hini speur ar pervez; lec'hiet e vez peurliesañ dindan al levgenn er rannbarzh klunegenn-sac'henn.

entérolithe ◇ **enterolith** ◇ **pervezvaen g. pervezvein** Fetisaenn e rezh traezh bezant en oaled ar pervez, ent kimiek fosfatoù amoniom-magneziom.

entéromyxorrhée ◇ **myxorrhoea intestinalis** ◇ **glaurver g. pervez** Usvorc'h glaur pervez a stader dreist holl gant ar c'houstividi hag, ent klasel, an neurasteneion.

entéropathie ◇ **enteropathy** ◇ **pervezanaez g., perveznaoued g.** Anvadoù rumm klañvadurioù ar pervez.

entéropathie exsudative, lymphangiectasie intestinale, maladie de Waldmann ◇ **protein-losing enteropathy** ◇ **perveznaoued naouezennus** Kleñved familhel ar vouzellenn voan, naouus *ent neuziadurel* dre usvoll ar gwazhied limf endan-c'hlaourgenn hag endan-levgenn, *ent klinikel* dre c'houlivou, a-wechoù dre an darc'hoal hag al laurioù kof; da heul adaverezh ar protid dre ar ganol vezhur e leia feur ar proteinoù gwad, dreist holl feur an albuminoù, an immunoglobulin G hag an transferrin; e par ar goulakaat emañ arbennelezh ar c'hleñved : kevarguziñ a reer ar vezañs eus anafoù en epitelienn ar pervez, un orin en anaeziou kalon, avu, lounezh, h.a.

entéropathogène ◇ **enteropathogenic** ◇ **pervezkleñvedus aa.** En araez da zec'han kleñvedoù pervez, kiriek d'ur c'hleñved pervez.

entéropexie ◇ **enteropexy** ◇ **pervezAanlenañ** Stagañ surjanel ar pervez ouzh speur ar c'hof.

entérorectostomie, anastomose entérorectale ◇ **enterorectostomy** ◇ **pervezadforzhañ er youlc'h, dasforzhañ pervez-youlc'h** Skarvañ surjanel ur c'hilbleg eus ar vouzellenn voan ouzh ar youlc'h; gwezhiet pa vez loet re izel ar skoilh ouzh trehent an danvezioù evit ma ve graet un dasforzhad etre-kilblegoù (sl. *colorectostomie, entéro-anastomose*).

entérorénal : syndrome ~ ◇ **enterorenal syndrome** ◇ **azoniad pervezlounezhel, troazhanaez pervezien** Hollad an darvoudoù poreel en organoù troazhañ (lestrfo, lestrlounezhfo, c'hwezhiellfo) a orin pervezel, peurliesañ e dianlen ur resmiad pervezfo gant goustivadur.

entérorragie ◇ **enterorrhagia** ◇ **pervezwadiñv** Diwad ar pervez.

entérorrhapie ◇ **enterorrhaphy** ◇ **pervezdlita** Krafelañ ur gouli pervez, da skouer e lankad diwezhañ an dasforzhañ.

entéroskopie ◇ **small intestinal endoscopy, small bowel endoscopy** ◇ **pervezengweliñ** Luc'hwereañ antrewan speur ar vouzellenn voan diwar-bouez un endoskop ebarzhet a-zialaez pe a-ziadrañ.

entéropasme ◇ **enterospasm** ◇ **pervezandag g.** Argrezad dasstrizhek laurus eus ul lodenn bras pe vrasoc'h eus ar pervez gant neurozeion 'zo.

entérostomie ◇ **enterostomy** ◇ **pervezeforzhañ** Skarvañ trebadek pe amzeriat ur c'hilbleg eus ar vouzellenn voan ouzh speur ar c'hof.

entérotomie ◇ **enterotomy** ◇ **pervezbenañ** Digeriñ surjanel ur c'hilbleg eus ar vouzellenn voan evit digarzhañ an endalc'h-ad anezhañ, eztennañ ur c'horf estren pe dazbidañ ur yoc'henn.

entérotoxine ◇ **enterotoxin** ◇ **enterotoksin g.** Toksin bakteriel o tizhout ar pervez.

entérotrope ◇ **enterotropic** ◇ **pervezkerc'h aa.** Tuet da dizhout ar pervez, sk. : *virus pervezkerc'h*.

Entérovirus ◇ **Enterovirus** ◇ **Enterovirus g.** Genad viruzoù gant RNA bezant e kanol vezhur ar mellkeineged, gougevret ouzh kerentiad ar *Picornaviridae*, isrannet e pemp spesad (ar polioviruzoù hag an enteroviruzoù denel); kiriek int da gleñvedoù dispuilhat, analadel, nerverl, kaherel lemm kuñv ha, peurliesañ, da boreadoù diazon.

enthèse ◇ **enthesis** ◇ **enlenva g. -où** Lec'h m'emañ enlenet ouzh an eskern ar c'higennoù, ar stirenoù, ar stagelloù, ar pourc'hadoù kenwell.

enthésite, enthésopathie, tendinite d'insertion, mal des insertions, tendinite rhumatismale ◇ **enthesitis, enthesopathy** ◇ **remm an enlenadoù, enlenfo g. -ioù** Remm ec'harzel sezet en enlenva ar stirenoù, ar stagelloù hag ar faskiennoù, alies e dianlen un daraez (arskodennfo).

entoptique ◇ **entoptic** ◇ **enlagadel aa.** Lec'hiet e-barzh ar voull lagad; *gweled enlagadel* (Gl. *vision entoptique, image entoptique, Sz. entoptic imagery*) a reer eus gwelout al luc'hsae an unan (korrwazhied ar vrizhenn hag an amred enno) (sl. *entoscopie*).

entorse ◇ **sprain** ◇ **gweadenn b.** Anaf daraezel en ur c'henvell diwar un torgammañ trumm, darhedañ pe difrapañ ar stagelloù, hep dilec'hiad padek eus an talbennoù kenvellañ; *gwaskadenn* (Gl. *foulure*) a reer eus ur weadenn leiek hep difrapad ar stagelloù.

entoscopie ◇ **autofundoscopy** ◇ **unandeunselliñ** Dedalvout ar gweled enlagadel da imbours'hñ amred ar gwad el luc'hsae an unan dre araez ur c'halvezder, anezhañ sellout ouzh ur vammenn luc'h kreñv a-dreuz d'ur bodeller hag ur werenn uviol o pourchas al luc'h unliv; ar gouziviad a wel ar c'helligoù ruz o loc'hañ e-barzh ar c'horrwazhied nes d'ar vrizhenn (sl. *entoptique*).

entotique ◇ **entotic** ◇ **enskouarnel aa.** A-zivout un trouz a zo e orin er skouarn grenn pe e gwazhied kavenn an daboulin.

entour-

- *endothélium reposant sur une basale entourée ou non d'un périthélium* endotelienn o c'holeiñ un diazkennenn gronnet pe get gant ur beritelienn
- *espace entourant le corps* amegor
- *hémiespace entourant le corps* ledamegor
- *membrane entourant l'œuf vierge* kennenn o c'hronnañ ar vi gwerc'h
- *les poumons entourés de la plèvre* ar skevent gronnet gant ar grezenn
- *mince anneau* de

substance grise qui entoure les formations interhémisphériques gwalenn voan a steuñvenn louet oc'h enklc'hiañ ar furmadurioù etre-hanterennoù • *odeur désagréable perçue par le patient et par son entourage* c'hwezh fall merzhet gant ar gouziviad ha gant an dud nes • *placement à la demande de l'entourage* endredad diwar c'houlenn an nesaourion • *rectum périméal entouré d'un muscle strié* youlc'h a-c'harbedenn gronnet gant ur gigenn rizenek.

entozoaire ◇ **entozoon** ◇ **entozoenn** b. **entozoed** Arvevad loenel o trigañ e-barzh korf an den hag al loened (sl. *endoparasite*).

entraîn-

• *contraction ventriculaire entraînée par une systole atriale* argrezad kofig delanket gant ur sistol kentez • *déplacements entraînés par les forces balistiques* dilec'hiadoù dec'hanet gant an nerzhou devannañ • *dissolution brutale du tonus de posture entraînant la chute du sujet* steuz trumm an tant diaboz oc'h ober d'ar gouziviad kouezhañ • *entraînement épicaudique, endocavitaire* enluskañ gorrekalonel, enkavennel • *entraîner un mécanisme* keflc'hañ ur wikefre • *ingestion entraînant la contraction de la vésicule biliaire* euvradur o lakaat ar gellenn vestl da argrezañ • *la carence en vitamine D₂ entraîne le rachitisme* emañ negez ar vitamin D₂ e devoud al lec'h • *susceptible d'entraîner une réaction allergique* en araez da zec'han un erwezh allergek • *vasoconstriction entraînant une baisse de la tension* gwazhiedstrishaat o tevoudañ ul leiadur eus gwask ar gwad.

entrer, entrée

• *à l'entrée du vagin* e digor ar gouin • *acide aminé entrant dans la synthèse du glutathion* amindrenkenn kedrann enaozañ ar glutation • *bureau des entrées* burev an entiañ, darbennva • *entrant (en hôpital)* entier, darbenned • *protéine entrant dans la constitution des myofibrilles* protein parzhiat en amparadur ar c'haherwianoù.

entrecrois-

• *lésion de la région chiasmatisque où s'entrecroisent les fibres visuelles* anaf e rannbarzh ar gweltre ma kroazigell ar gwiennù gwelod • *membrane formée de fibres conjonctives entrecroisées* lienenn furmet diwar wiennoù kenglenel daskroaziet.

entropion ◇ **entropion** ◇ **entropion** Drekc'hwelad ribl ar valvenn o tegas ar malgud e diastok ar gornsae.

énucléation ◇ **enucleation** ◇ **ezklorennañ** 1 Amzivenañ ur yoc'henn volc'hennet dre he ezvountañ etre div vriell ur flañchadenn (evel ma lamer maen ur gerezenn). 2 Amzivenañ ar voull lagad a-dreuz da flañchadenn ar gevresae (sl. *éviscération*).

énurésie ◇ **enuresis** ◇ **ardroazhañ** Dilaoskiñ troazh andiarvenn ha dirat en ezvezañs nep anaf en organoù troazhañ (ent klasel goude an oad a 5 bloaz); pa c'hoarvez an ardroazhañ dre ar c'houk e komzer a *hundoazhañ* (Gl. *énurésie morphéique*) (sl. *encoprésie*).

enveloppement ◇ **pack** ◇ **ampak** g., **ampakad** g., **ampakañ**, **amlennad** g., **amlennañ** Arloañ fank havel, flastrenn felu, parafin, h.a. war un darn eus ar c'horf pe war ar c'horf a-bezh, farlokañ ar c'horf en ul lien gleb pe intret gant un danvezenn yac'hadel (sl. *boue thermale*).

envenimation, enveniment ◇ **envenomization** ◇ **binimadur** g. Kontammadur hollek diwar flemmadenn un naer, ur grug, ur wespedenn, h.a.

environ-

• *environnement au sens large, ambiance* endro, amva • *environnement écologique* trevva • *environnement physique* amva • *environnement vécu, monde* amved • *environnemental* trevvael • *espace environnant le corps* amegor.

enzootie ◇ **enzootic disease, enzooty** ◇ **broreuziad** g. **loenel, milvroreuziad** g. Kleñved o tizhout agendalc'h pe a-vareadoù un pe lies spesad loened en ur vroezenn.

enzymatique ◇ **enzymatic** ◇ **enzimel** aa., **enzimatek** aa. A-zave d'an enzimoù.

enzymatique : système ~ ◇ **enzymatic system** ◇ **reizhiad** b. **enzimatek** Teskad enzimoù a zo kenurzhiet o gweredrezh, da skouer evit treluskañ lerc'h ouzh lerc'h al lankadoù eus ur widennad ec'haozañ pe eus ur widennad enaozañ kennevidel.

enzymatique : unité internationale ~ ◇ **international enzym unit** ◇ **unanenn enzimatek etrevroadel** Unanenn wered treluskañ an enzimoù, kementad enzim ret da dreuzfurmiñ un dindanad 1 mol en 1 eilenn; ar c'*hatal* eo (arouez : *kat*) er reizhiad SI; un ananenn gent, UI, a dalvez 16,67.10⁻⁹ katal.

enzyme ◇ **enzyme** ◇ **enzim** g. Danvezenn broteinek bevenaonet en araez dre he ferzhioù treluskañ da vliavaat un dazgwered kimiek lavaret; bez' ez eus anezhi pe un holoprotein o c'hoarvezout a amindrenkennoù hepken, pe un heteroprotein oc'h enderc'hel, ouzhpenn amindrenkennoù, ur stroll prostetek, hemañ oc'h amparañ ar c'*hoenzim*, ar parzh proteek o vezañ an *apoenzim* (sl. *apo-enzyme, coenzyme*).

enzyme de conversion de l'angiotensine, kininase II, angioconvertase ◇ **converting enzym** ◇ **enzim amdreiñ an angiotensin, angiokonvertaz** g. Enzim enaozet en avu o treuzfurmiñ er skevent an angiotensin I en angiotensin II (gwazhiedstrishaer kreñv) hag oc'h ezniñvañ ar bradikinin (gwazhiedfrankaer); gwered *ezniñverioù an enzym amdreiñ* (Gl. *inhibiteurs de l'enzyme de conversion, Sz. conversion enzym inhibitor*) eo leiaat ar gwask talmerel dre heudiñ enaoz an angiotensin II hag ec'haoz ar bradikinin; o diouint a reer evit prederiañ an uswask hag ar skorted kalon.

enzymes : code des ~ ◇ **enzyme code** ◇ **boneg** b. **an enzimoù** Destladur kefridiel etrevroadel an enzimoù, kavlec'hiet hervez un niverenn peder steudad sifrennoù etrezo pikoù goude an div lizherenn EC (*Enzyme Commission*); ar steudad kentañ a verk ar *stroll* (1. oksidoreduktaz, 2. transferaz, h.a.), an eil steudad an *isstroll*, an trede an *eilisstroll*, ar pevare ar *renk* en deus an enzim en eilisstroll; da skouer, EC 3.1.3.1 zo arouez ar fosfataz alkaliek, EC 1.1.1.27 al laktikodezhidrogenaz.

enzymologie ◇ **enzymology** ◇ **Enzimouriezh** b. Studi an enzimoù.

enzymopathie ◇ **enzymopathy** ◇ **enzimanaez** g. Kleñved hêrezhel diwar ezvezañs, skorted pe darallad un enzym, ur stroll enzimoù pe ur reizhiad enzymatek, da skouer ar glikogenoz, gwadc'halaktozegezh ha troazhfruktozegezh ar vagadell, an amwad loezadel olenzimel.

enzymoprive ◇ **enzymoprival** ◇ **olenzimel** aa. A-zave d'un diouer enzym.

enzymothérapie ◇ **enzymotherapy** ◇ **enzimgurañ** Arver yac'hadel an enzimoù.

éonisme ◇ **eonism** ◇ **eonegezh** b. Tech gant gwazed 'zo da emwiskañ gant dilhad merc'hed (sl. *paraphilie, travestisme*).

éosinopénie ◇ **eosinopenia** ◇ **olgwenn** g. **eozinofil**, **oleozinofil** g. Isniver ar granulokit eozinofil.

1 éosinophile 2 **éosinophiles**, **éosinocytes** ◇ **1 eosinophilic** 2 **eosinophils**, **eosinocytes** ◇ **1 eozinlen** aa., **eozinofil** aa. 2 **eozinofil** s., **eozinokit** s. 1 (Kimiezh, Gwiadoniezh) lenidik ouzh an eozin. 2 Anvad kurzhet eus un ac'had leukokit, ar *granulokit eozinofil* (Gl. *granulocytes* pe *polynucléaires éosinophiles*), heverk dre o c'hraoñell vras ha lieshoskek ha greunennadoù tev lenidik ouzh an eozin, bezant er gwad, e skrouediadoù an astmateion hag e borc'hadoù kleñvedel 'zo.

éosinophilie ◇ **eosinophilia** ◇ **1 eozinlen** g. 2 **elwenn** g. **eozinofil**, **eleozinofil** g. 1 Lenidigezh ouzh an eozin hag al livuzennoù trenkek. 2 Usniver ar granulokit eozinofil (dreist 500 / mm³), stadet er stadoù allergek, gant kankrou 'zo, gwadnaouedoù 'zo, h.a.

éosinophilie-myalgies : syndrome ~ ◇ **eosinophilia-myalgia syndrome** ◇ **azoniad eleozinofil-kaherost** Kevreted kaherostoù hollek, yazadoù kroc'hen hag eleozinofil dreist 2 000 / mm³ a reuzias er Stadoù-Unanet e 1989 e dianlen an euvriñ liaoù enno an L-triptofan; azoniad heñvel war veur a boent ouzh azoniad an eoul pistriek spagnat hag ouzh azoniad Shulman.

éosinophilie tropicale ◇ **tropical eosinophilia** ◇ **eleozinofil trovanel** Anaez stadet da gentañ e gevred Azia, ha goude e broezioù trovanel all, naouus dre zisleberad ar stad hollek (terzhienn, treutadur) hag un azoniad bronkez gant paz kilvers ha trec'hwezh, ur strewad brizhennoù aront e skinlun an div skeventenn hag un elwenn uhel (etre 30 000 ha 50 000 a leukokit, en o zouez 80 da 90 % a eozinofil); gant ar c'himgurañ e teu diouzhtu ar pare; hep mezegadur e tedro ar c'hleñved etrezek an henegezh; peurliesañ e vez kiriek un arvevadezh, ur filariaz limfel diwar *Wuchereria bancrofti*; kleñved nes da azoniad Löffler.

épais-

- *cartilage hyalin dont l'épaisseur est fonction de la pression supportée par l'articulation* gwervigom a zo e devder a-geñver gant ar gwask o ren war ar c'henvell
- *épaississement de la paroi des artères* tevadur eus speur an talmerennoù
- *épaississement ectoplastique situé à l'apex du bourgeon du membre* tevaenn ektoplastek loet e kern nov un ezel
- *inoculer dans l'épaisseur de la peau* enkoriñ e diabarzh ar c'hroc'hen
- *l'épaississement des valves* tevaat ar sac'helloù.

épanchement ◇ **effusion** ◇ **fennad** g. Bezañs ezreol liñvenn (levruzenn, gwad, bestl) pe aezhenn en ur gavenn.

épanchement

- *épanchement de bile* fennad bestl
- *épanchement de chyle* fennad sugenn
- *épanchement gazeux* fennad aezhenn, fennad aezhel
- *épanchement hydro-aérique* fennad aerliñvel
- *épanchement liquidien* fennad liñvenn, fennad liñvel
- *épanchement péricardique* fennad (en) amgalonnenn
- *épanchements dans les cavités séreuses* fennadoù er c'havennoù levrigennek
- *épanchements séreux exsudatifs* fennadoù trenaeuzek el levrigennoù.

épaule ◇ **shoulder** ◇ **skoaz** b. Rann eren ar vrec'h ouzh ar c'hef, lodek e gouriz an ezel krec'h, pennelfenn enni *kenvell ar paler* (Gl. *articulation scapulo-humérale*) (sl. *ceinture scapulaire*).

épaule ballante ou **flottante** ◇ **loose shoulder** ◇ **skoaz laosk** Anaez naouus dre isteñv ar skoaz, hirded vuiek pourc'had ar c'henvell, peurandraft an ezel a chom blej ha gouzañvat, e dianlen ar seizi eus holl gigennoù ar skoaz diwar ur melfo peurliesañ, a-wechoù diwar zistruf an talbennoù kenvellañ.

épaule gelée ◇ **frozen shoulder** ◇ **skoaz sonn** Reuted kenvell ar paler er bazenn henek eus troarzfio ar skoaz; fiñvoù ar skoaz a vez graet dre ar c'houbl planken-brusk.

épaulette : déformation en épaulette ◇ ◇ **disneuziadur skoarchellek** Distummadur ar skoaz naouus d'un disvellad araok-diabarzh : loet emañ ar gigen delta a-zerc'h dindan ar gern-skoaz, alese ar stumm plat a zo d'ar skoaz e-lec'h an drolinenn aront boas.

épaulière ◇ **shoulder strap** ◇ **skoazenn** b. Amsteudell o c'hronnañ ar skoaz.

épendyme ◇ **ependyma** ◇ **ependim** g. Kennenn o c'hoarvezout eus un epitelienn granennek, o c'holeiñ gorre kanol greiz ar mel a-livenn hag ar c'hambrou empenn; lodek eo kelligoù an ependim (*ependimokit*, Gl. *ependymocytes*) en neuroglia.

épendyme : canal de l'~ ◇ **canalis centralis spinalis** ◇ **kanol greiz (ar mel a-livenn)**, **kanol an ependim** Kanol kehent gant ar pevare kambur.

épendymite ◇ **ependymitis** ◇ **ependimfo** g. Tanijenn eus kanol greiz ar mel a-livenn.

épendymoblastes ◇ **ependymoblasts** ◇ **ependimoblast** s. Kelligoù rizhellek oc'h emdreiñ en ependimokit.

épendymome ◇ **ependymoma** ◇ **ependimom** g. Yoc'henn evodet diouzh an ependimokit, a stader gant ar vugale dreist holl, sezet er c'hambrou empenn pe er mel, kuñv ent wiadoniell, grevus koulskoude rak anheziraez alies.

éperon ◇ **spur** ◇ **kentrenn** b. Tilhenn o tispartañ an div igorenn bervez en un adfrazeh surjaniel, anezhi ur balir eus speur donañ ar c'hilbleg adforzhet ouzh ar c'hroc'hen hag ilinet serzh; diziouer evit diogeliñ peurzistreg an oulennoù.

- éperon trachéal** ◇ **carina tracheae** ◇ **beg forc'h ar vriant** Kribenn greizer loet e penn traoñ ar vriant o tispartiañ igorennoù an div bennvronkezenn.
- éphapse** ◇ **ephapsis** ◇ **efaps** g. Kenstok ezreol a-gostez etre daou sinaps.
- éphédrine** ◇ **ephedrine** ◇ **efedrin** g. Alkaloid a voe douhennet da gentañ eus brousgwez eus ar genad *Ephedra*, kevanaozet hiziv, simpatomimetek ha kentraouer an nerveg kreiz, arveret hiziv evel dizarwazher fronel.
- éphélide, tache de rousseur** ◇ **freckle, ephelis** ◇ **letin** g., **efelid** g. Brizhenn vihan gell o tont war ar c'hroc'hen dre wered an heol hag an avel.
- épidrose** ◇ **ephidrosis** ◇ **efidroz** g. Strafulilh ar c'hwezparañ, naouus dre un usvorc'h en ur parzh eus ar c'horf, sk. : *efidroz talel ha kloppennel an arzfoeion*.
- épiBLaste** ◇ **epiblast** ◇ **epiblast** g. Lodenn eus an ektoderm o tiforc'hekaat d'ober ar c'hroc'hen.
- épiBLépharon** ◇ **epiblepharon** ◇ **epiblefaron** g. Aspleg kroc'hen kammneuziat a-hed ur valvenn o kildreññ ar malgud e diastok ar gornsae.
- épicanthus, épicanthis** ◇ **epicanthus** ◇ **epikantuz** g. Aspleg kornloarek ar c'hroc'hen o c'holeiñ ank diabarzh al lagad.
- épicarde** ◇ **epicardium** ◇ **ezkalonenn** b. Feilhenn flugezel an amgalonenn.
- épicardique** ◇ **epicardial** ◇ **1 ezkalonennel** aa. **2 gorrekalonel** aa. 1 A-zave d'un ezkalonenn. 2 A-zave da c'horre ar galon, sk. : *elektrod gorrekalonel*.
- épicardite** ◇ **epicarditis** ◇ **ezkalonennfo** g. Tanijenn an ezkalonenn.
- épicondylalgie** ◇ **epicondylalgia** ◇ **arskodennost** b. Laur en un arskodenn.
- épicondyle** ◇ **epicondyle** ◇ **arskodenn** b. Balir askorn loet e-kefin hag a-us d'ur skodenn, sk. : *arskodenn greizel ar paler* (Gl. *épicondyle médial de l'humérus, épitrochlée*), *arskodenn gostezel ar paler* (Gl. *épicondyle latéral de l'humérus, épicondyle*), h.a.
- épicondylite, épicondylose** ◇ **epicondylitis** ◇ **arskodennfo** g. Tanijenn un arskodenn; an hini anavezetañ eo an *arskodennfo palerel* pe *ilnost an tennisour* (Gl. *épicondylite humérale, épitrochlée, épitrochléalgie, Sz. tennis elbow, tennis arm, golf elbow*) diwar regas an arvrec'h pe hegeusaat an amaskornenn da heul un daraez leiek.
- épicrise** ◇ **epicrisis** ◇ **1 diandezrann** g., **diandezrannañ** **2 ec'heizigenn** b. 1 Imbourc'h dezvarnek renet war ur c'hleñved arsellet adalek e zeroù betek e ziwezh. 2 Teskad an anadennoù o tarvezout goude an eizigenn hag a un ster ganti.
- épicritique** ◇ **epicritic** ◇ **1 ec'heizigel** aa. **2 skaradel** aa. 1 O tarvezout goude an eizigenn. 2 A-zivout ar stokeraeziañ, ar gwrezaereziñ, o reiñ tro da ziforc'hekaat argemmoù munut en ergorennoù; anv a reer ivez a *skarat stokadel* (Gl. *discrimination tactile*).
- épicutané** ◇ **epicutaneous** ◇ **argroc'hene** aa. War c'horre ar c'hroc'hen.
- épicutané : test** ~, **épidermoréaction** ◇ **patch testing** ◇ **prouad** g. **argroc'hene** aa., **prouad an teltan, ezkroc'herwez** g. Dodiñ war an ezkroc'hen hep e araskañ ul lomm eus un danvezenn evit dinoiñ kizidigezh ar c'hroc'hen outi.
- épidémicité** ◇ **epidemicity** ◇ **1 darreuziadeg** b., **darreuziadegezh** b. **2 darreuziadelezh** b. 1 Perzh bezañ darreuziat pe darreuziadek gant kleñvedoù 'zo. 2 Keal an darreuziañ pe an darreuziadoù.
- épidémie** ◇ **epidemia** ◇ **darreuziad** g., **darreuziañ** Emledañ ur c'hleñved pe un anadenn anaazel o tizhout en amveziadoù divoas un dregantad eus ar boblañs war un tiriad lavaret, sk. *un darreuziad brec'h nij, un darreuziad emlazoù*; e lavar ar pemdez ez arverer an termen da aroueziañ an nodiñ hag ar skignañ herrek eus ur pore tredizhus evel ar vrec'h nij end-eeun, ar grip pe ar c'hreuzpervezfo.
- épidémiologie** ◇ **epidemiology** ◇ **Reuziadoniezh** b. Ster kentañ, dilezet, an termen oa "studi an darreuziadoù"; hiziv, skourr ar Vezekniezh o studiañ ar parennoù diseurt o tasperzhiañ e dinodadur hag e dedroadur ar c'hleñvedoù, na pa ve an kez parennoù e dalc'h an hiniannoù o unan pe an amveziadoù.
- épidémiologique** ◇ **epidemiological** ◇ **reuziadoniel** aa. A-zave d'ar Reuziadoniezh, sk. : *despizadur reuziadoniel ar bronkezf-henek*.
- épidémique** ◇ **epidemic** ◇ **1 darreuziat** aa., **darreuziadek** aa., **darreuzius** aa. **2 darreuziadel** aa. 1 A-zivout ur c'hleñved, o tarreuziañ, oc'h erzerc'hañ e rezh darreuziadoù. 2 A-zave d'an darreuziañ pe d'an darreuziadoù.
- épidémique : seuil** ~ ◇ **epidemic threshold** ◇ **gwehin** g. **darreuziadel** Dregantad a 'r boblañs tizhet gant un anaez darreuziadek war un tiriad lavaret d'un ampoent-mañ ampoent a rank bezañ direazet evit ma ve diskleriet un darreuziad, sk. : 166 degouezh dre 100 000 annezad eo *gwehin darreuziadel ar grip*, 185 dre 100 000 *gwehin darreuziadel an darc'hoal lemm*.
- épiderme** ◇ **epidermis** ◇ **ezkroc'hen** g., **epiderm** g. Parzh gorre ar c'hroc'hen, dispartiet diouzh an derm dre an *diakennenn*, anezhañ un epitelienn valpigiel haenek keratinaet, ennañ div lodenn : a) ur gwelead don (*gwelead Malpighi, haen gellidek* pe *haen diaz*), ouzh e ober un diazez kelligoù oc'h emrannañ paot hag o tsvountañ an *haen spernek (stratum spinosum)*, anezhi kelligoù pikek, hag ur gwiskad kelligoù war zic'henezhañ, an *haen c'hreunek (stratum granulosum)*, b) ur gwelead gorre, ar *gornhaen (stratum corneum)*, graet gant an *haen c'hlein (stratum lucidum)* hag un *haen c'hourc'hennus (stratum disjunctum)* (sl. *basocellulaire, chorion, hypoderme, spinocellulaire*).

- épidermique** ◇ **epidermic** ◇ **ezkroc'henel** aa., **epidermel** A-zave d'an ezkroc'hen, d'an epiderm.
- épidermoïde** ◇ **epidermoid** ◇ **ezkroc'henvanek** aa. A luniad pe a natur gant an ezkroc'hen, sk. : *kist ezkroc'henvanek*, kist endan-groc'hen diwar ambac'hadur un tamm ezkroc'hen.
- épidermolyse bulleuse héréditaire** ◇ **epidermolysis bullosa hereditaria** ◇ **ezkroc'henloez** g. **gloevennek hêrezhel** Dermatoz hêrezhel dibaot naouus dre vreskted an ezkroc'hen, hemañ o tispegañ hag o furniñ glovennoù pa vez pouezet warnañ.
- épidermomycose** ◇ **epidermomycosis** ◇ **epidermomikoz** g. Anvad rumm evit an dermatomikozioù ma trig ar foue en ezkroc'hen.
- épididyme** ◇ **epididymis** ◇ **argell** b. Organ hirvoan kempeg ouzh ribl adreñv ar glidenn, ennañ forzh degorzhañ ar sper e rezh ur ganol goustellet o kenderc'hel gant ar san sper (sl. *canal épiddymaire*).
- épididymite** ◇ **epididymitis** ◇ **argellfo** g. Tanijenn an argell, kevredet alies gant ar c'hlidennfo.
- épididymographie** ◇ **epididymography** ◇ **argelluniñ** Skinluniñ an argell goude ensinklañ dre ar san sper un aozad demeraer.
- épididymotomie** ◇ **epididymotomy** ◇ **argellenbenañ** Digeriñ ent surjanel an argell.
- épidurale** ou **péridurale** : **méthode** ~ ◇ **epidural method** ◇ **hentenn wardevel** Ebarzhiñ un danvezenn lael er gavenn war-dev, eleze etre kanol ar groazell hag ar pilhon.
- épidurite** ◇ **epiduritis** ◇ **wardevfo** g. Tanijenn ar gwiad kenglenbehinel er gavenn war-dev (loet etre kanol ar mellkein hag ar bilhonenn dev).
- épidurographie, péridurographie** ◇ **epidurography** ◇ **wardevluniñ** Skinluniñ goude demeraat ar gavenn war-dev.
- épigastralgie** ◇ **epigastralgia** ◇ **argreuzennost** b. Laur en argreuzenn.
- épigastre, région épigastrique** ◇ **epigastrium** ◇ **argreuzenn** b. Rannbarzh krec'h ha kreizer ar c'hof, loet etre an div c'hougestadenn, warnañ ur bukadenn vas, ar poull argreuzel.
- épigastrocèle** ◇ **epigastrocele** ◇ **argreuzennogad** g. Avelenn dre al linenn wenn e par an argreuzenn.
- épiglotte** ◇ **epiglottis** ◇ **ankoue** g. Pevh migornek kreizer, arblat, heloc'h, loet a-dreñv gwizienn an teod a-us d'an tarz; gwazeziñ a ra ar c'harloc'henn dre zrekstouiñ ha stankañ an tarz da geñver al lonkañ.
- épiglottite** ◇ **epiglottitis** ◇ **ankouefo** g. Tanijenn lemm ar c'harloc'henn hag ar c'hargadenn, muiet e par an ankoue; un trummad eo ankouefo diwar *Haemophilus influenzae* gant ar vugale en askont d'ar riskl a angwent.
- épilepsie** ◇ **epilepsy** ◇ **droukfell** g. Anaez naouus dre c'hrezvarroù, anezho blivadou trumm, diaser ha kreñv eus un niver bras a neuron en empenn, an *diskargoù droukfell*; ent klinikel ez erzerc'h ar grezvarroù e rezh *barradoù droukfell*, dezho furmoù liesseurt e-keñver o astenn pe o natur : barradoù hollek pe darnek, barradoù loc'hadel pe dianennoù; diziouerus d'an deznaouiñ eo an imbours'hioù amglinikel, peurgetket an *empennvarrweziñ* a laka a-wel war un darn vras pe vrasoc'h eus ar c'hlopenn kemaladoù gwagennoù trumm o deroù hag o dibenn, kempredat d'ar barradoù (kemplezhioù pikbaot, h.a.) (sl. *absence, crise 2, décharge épileptique, électroencéphalogramme, électroencéphalographie, pointe-onde : complexe* ~).
- épilepsie affective** ◇ **affect epilepsy** ◇ **1 droukfell kantaezek 2 droukfell kantaezien** 1 Droukfell a vez ar barradoù gantañ o teraouiñ dre ur gaoquad spontañ pe un diskordadenn c'hoarzhin. 2 Droukfell ma vez delantek ar barradoù gant ur fromadenn.
- épilepsie akinétique** ◇ **akinetic epilepsy** ◇ **droukfell anfiñvel** Furm droukfell hollek, paot gant ar vugale, ma kouezh ar gouziviad ha ma chom difiñv e-doug un nebeut munudoù, kevret gant koabrennegezh pe koll kenskiant hep steuz eus an tant kaherel (sl. *akinétique : crise* ~).
- épilepsie atonique** ◇ **atonic epilepsy** ◇ **droukfell antantel** Furm droukfell hollek oc'h erzerc'hañ dre varradoù ma steuz an tant diaboz epad 1 pe 2 eilenn (*difloskad droukfellel*, Gl. *effondrement épileptique*), pe edoug un nebeut munudoù, ar gouziviad o chom difiñv ha digenskiant war ar leur (*dianenn antantel*, Gl. *absence akinétique*).
- épilepsie focale ou partielle ou locale ou corticale** ◇ **focal epilepsy** ◇ **droukfell annonel pe darnek pe lec'hiek pe pluskennel** Droukfell diwar un annon blivaat loet en ul lec'hienn eus an empenn, er bluskenn hogos bepred, naouus dre varradoù oc'h angorzhañ ur parzh eus ar c'horf : erzerc'hadoù loc'hadel, santadel pe struzhel (*barradoù kofel*), pe an arc'hwelioù bred (*barradoù bredel, bredsantadel, bredloc'hadel*); ur barrad droukfell darnek a c'hell treiñ en ur barrad hollek (sl. *épilepsie temporale*).
- épilepsie généralisée** ◇ **generalized epilepsy** ◇ **droukfell hollek** Droukfell naouus dre erzerc'hadoù o tizhout ar c'horf a-bezh, dezhañ div furm : *a*) ar furm vuiek (*droug bras*, Gl. *grand mal*) anezhi koll kenskiant, kouezh ha strafuilhoù loc'hadel e rezh glizi en holl gigennoù rizennek : dargrezad ha boleadoù argrezadoù a-stroñs (*barrad ustant-kridoù*, Gl. *crise tonico-clonique*), war un dro gant direizhoù nervstruzhel : kalonustead, uswask talmerel, mabusvoll; *b*) ar furm leiek (*droug bihan*, Gl. *petit mal*) ma renker an *dianenn* (Gl. *absence*), an *droug bihan kridek* (Gl. *petit mal myoclonique*), an *droukfell anfiñvel* hag an *droukfell antantel* (sl. *absence, clonie, convulsion 2, épilepsie akinétique, épilepsie atonique*).
- épilepsie métabolique** ◇ **metabolic epilepsy** ◇ **droukfell kennevidien** Furm droukfell a stader gant ar vugale yaouank dreist holl, e dalc'h un ezreolder mezhurel, migennevid ar piridoksin (piridoksinrankoud), an amindrenkennoù (dilerc'hegezh fenilpiruvek), h.a.
- épilepsie myoclonique** ◇ **myoclonus epilepsy** ◇ **droukfell kridek** Anvad genadel ar furmoù droukfell ma stader kridoù, ha pa zarvezfe ar remañ da geñver barradoù droug bras pe droug bihan pe etre ar barradoù.

épilepsie procursive ar **ambulatoire** ◇ **procursive epilepsy** ◇ **droukfell baleadek** Furm droukfell bredloc'hadel ma c'hoarvez ar barradoù eus pennadoù kerzhout pe redek.

épilepsie psychomotrice ou **temporale** ◇ **temporal lobe epilepsy** ◇ **droukfell bredloc'hadel** pe **droukfell ividig** Furm droukfell darnek kemplezh he azoniadur : azonoù bredel (trezerc'hañ, ezaouiñ egoramzerel, enkreuz), loc'hadel (realoù ha dilec'hadoù errizhek); daralladoù empennvarwezadel o tiskouez bezañ un annon e pluskenn an ividig; kemplezh ivez an arbennoù : neuziadurel (yoc'henn, kleizenn en dolbezenn ividig), arc'hwelel (direizhoù molekulel, domani war imbourc'h).

épilepsie réflexe ◇ **reflex epilepsy** ◇ **droukfell damoug** Seurtad droukfell hollek ma vez delanket ar barradoù gant ur fraouâd skiantennel (gweledel pe glevedel), sk. : *droukfell luc'hien* (Gl. *épilepsie photogénique*).

épilepsie sous-corticale ◇ **subcortical epilepsy** ◇ **droukfell danbluskennel** Droukfell a-geñver gant un anaf sezet er steuñvenn louet estreget ar bluskenn.

épilepsie versive, crise versive ◇ **versive or cycling epilepsy or seizure** ◇ **droukfell treiñ, barrad treiñ** Seurtad droukfell darnek ma c'hoarvez ar barradoù a zilec'hiadur kevreet eus parzhioù a'r c'horf diouzh ur c'hwelahel a-zerc'h : pe an daoulagad hag ar penn, pe an daoulagad, ar penn hag ar c'hef; peurliesañ e vez an treiñ a-eiltu d'an anaf (*barrad eiltudreiñ*, Gl. *crise contraversive*), dibaot e vez a-gendu (*barrad kendudreiñ*, Gl. *crise ipsiversive*).

épileptiforme ◇ **epileptiform** ◇ **droukfellheñvel** aa. O tennañ dre e neuz d'ur barrad droukfell, sk. : *strapadoù droukfellheñvel an darfell*.

épileptique ◇ **epileptic** ◇ **1 droukfelleg** aa. **2 droukfelleg** g. **-eion** **3 droukfellel** 1 Gant an droukfell. 2 Gouziviad an droukfell. 3 A-zave d'an droukfell.

épileptique : état de mal ~ ◇ **status epilepticus** ◇ **aroad** g. **droukfell** Lerc'hiad grezvarroù droukfell nesadek a-walc'h evit ma tremenfê ar gouziviad hep distreiñ d'ur stad reol (a-fet kenskiant hag empennvarwezañ pergen); arveret da gentañ a-zave d'an droukfell hollek, e talvez hiziv an termen da anvad genadel evit holl furmoù an aroad droukfell; derc'hel a reer neoazh da gomz eus *aroad droukfell darnek* (Gl. *état de mal partiel*).

épileptogène ◇ **epileptogenic** ◇ **droukfelleiat** aa. En araez da zec'han ur barrad droukfell.

épileptogène : aptitude ~ ◇ ◇ **droukfelleiadezh** b. Araezusted an empenn da erwezhañ ouzh fraouadoù 'zo dre varradoù droukfell.

épileptogène : foyer ~ ◇ **epileptogenic focus** ◇ **annon droukfelleiat** Tachad eus an nerverg ma nod broudadoù en araez da zec'han barradoù droukfell; anvad a lakaer ivez war lec'hiennoù eus ar c'hroc'hen a c'hell ar fraouaat anezho delankañ ur barrad droukfell.

épileptogène : seuil ~ ◇ **seizure threshold** ◇ **gwehin** g. **droukfelleiat** Kreñvder izek ar fraouâd en araez da zelankañ ur barrad droukfell.

épileptoïde ◇ **epileptoid** ◇ **droukfellvanek** aa. O tennañ dre e ardarzh d'an droukfell, sk. *brac'hitell droukfellvanek* (sl. *clonus, trépidation épileptoïde*).

épinysium ◇ **epimysium** ◇ **ezkaherenn** b., **epimiziom** g. Golo gwiad kenglenel en dro d'ar gignenn rizennek (sl. *endomygium, périnysium*).

épine calcanéenne ◇ **calcaneal spur** ◇ **kentrenn** b. **seul** Kreskenn loet war dalbenn traoñ an askorn seul, test skinlun eus tanijenn lienstirenn ar sol troad.

épine iliaque antéro-supérieure ◇ **iliac spine, anterior superior** ◇ **spennenn** b. **glun araok uhelañ** Torzhell loet e penn araok kribenn ar glun enlenet outi ar gignenn gemener, kigenn stenner ar faskienn ledan hag ar stagell c'henel-barlenn.

épine iliaque postéro-supérieure ◇ **iliac spine, posterior superior** ◇ **spennenn glun adreñv uhelañ** Torzhell loet e penn adreñv kribenn ar glun.

épineurectomie ◇ **epineurectomy** ◇ **eznervennezvenañ** Dilemel surjaniel golo un nervenn.

épineurolyse ◇ **epineurolysis** ◇ **eznervennloez** g., **eznervennloezañ** Diamwaskañ un nervenn dre zazbidañ ar golo anezhi.

épinèvre ◇ **epineurium** ◇ **eznervenn** b., **epineurion** g. Golo gwiad kenglenel en dro d'un nervenn (sl. *endonèvre, neurolemme, périnèvre*).

épiphénomène ◇ **epiphenomenon** ◇ **1 ec'hanadenn** b. **2 ec'hazon** g. 1 Anadenn ambrougat hep perzh e dialusk an adanenoù ambrouget. 2 Azon oc'h ambroug azonoù all hep talvoud evit an deznaouiñ.

épiphora ◇ **epiphora** ◇ **epifora** g. Diver daeroù war an divvoc'h pa na c'hellont ket tremen dre boentoù an daeroù (seizi an dremm, daersac'hfo) (sl. *lagophthalmie*).

épiphysaire ◇ **epiphyseal** ◇ **1 gourjadennel** aa. **2 talpennel** aa. 1 A-zave d'ar c'hourjadenn. 2 A-zave d'un dalpenn.

1 épiphyse, corps pineal **2 épiphyse** ◇ **1 pineal gland, pineal body** **2 epiphysis** ◇ **1 gourjadenn** b. **2 talpenn** b. 1 Furm-adur gwagrennek bihan arrott e pign ouzh lein an trede kamb, lodek en arzerc'hvel, a chom dianav pe dost e arc'hwel; borc'hañ a ra serotonin; ennañ ez eus noradrenalin, histamin, aketilkolin hag un enzim na gaver e nep lec'h all, ar 5-hidroksi-indol-O-metil transferaz, da berzh dezhañ treiñ ar serotonin e melatonin. 2 Penn, bazhoulek alies, an eskern hir.

épiphysectomie ◇ **pinelectomy** ◇ **gourjadennenezvenañ** Dilemel surjaniel ar c'hourjadenn.

épiphyiodèse ◇ **epiphyiodesis** ◇ **1 talpennglav g., talpennglaviad g. 2 talpennglaviñ** 1 Steuz daraezel ar migorn kevreañ ha soutadur ar parzhioù eskern glannat, o tec'han paouez kresk an askorn. 2 Gwezh surjaniel war-benn arsaviñ ar c'hreskiñ, anezhañ herzel ouzh arc'hwel ar migorn kevreañ dre araez un imboudenn.

1 épiphysiolyse 2 épiphysiolyse, coxa vara essentielle de l'adolescence, coxa flexa ◇ **epiphysiolysis** ◇ **1 talpennloez g., talpennloezañ 2 talpennloez, lez b. enkamm hennadek ar c'hrennoad, lez kromm** 1 Distruj kleñvedel eus penn un askorn diwar miwe ar migorn kevreañ. 2 (Dre grennañ erdal an termen) seurtad enkamm a 'l lez (*coxa vara*) da heul ar rikladur argammedek war dreñv eus broñs talpenn krec'h an askorn morzhed, dianlen d'ur c'hleñved eus ar migorn kevreañ, o tevoudañ berradur an ezel, kammlakadur war c'hwel diavaez eus an askorn morzhed ha, diwezhatoc'h, lezartroz.

épiphysite, épiphysose ◇ **epiphysitis** ◇ **1 talpennfo g. 2 talpennaoued g., epifizit g.** 1 Tanijenn laurus an dalpenn, o tizhout dreist holl korf ar melloù ha penn trede askorn ar c'hreiztroad. 2 Strafuilh en arc'hwel ar migorn kevreañ en araez da zec'han ur miwe.

épiplocèle ◇ **epiplocèle** ◇ **danterogad g.** Avelenn a zo danter enni.

épiplooplastie, épiploplastie ◇ **epiploplasty** ◇ **danteratelviñ** Seurtad ampelennaat a zewerc'her e-kerz an oberatadennoù war ar stomok, ar pervez pe ar forzhioù bestl, anezhañ danveziñ an danter evit goleiñ ar gorreennoù arwadus.

épisclérite ◇ **episcleritis** ◇ **amlersaefo g.** Tanijenn ar gwiad kellaouek en dro d'al lersae, stadet aliesoc'h eget al lersaefo, dezhi an un doareoù.

épisiorrhaphie ◇ **episiorrhaphy** ◇ **kourzhdlita** Gwezh surjaniel, anezhañ anforzhakaat ar gouin dre azbevaat ha krafaelañ talbennoù diabarzh ar muzelloù bras.

épisiotomie ◇ **episiotomy** ◇ **kourzhenbenañ** Gwezh amiegel, anezhañ flañchañ ar c'hourzh war-benn ledanaat an tremen e sell da hepkoriñ fregañ ar c'harbedenn hag anafañ kelc'hstrishaer ar fraezh e kerz ar gwilioud.

épisod-

- *adynamie épisodique* angremm spanaus
- *épisode dépressif* skoulad gouvid
- *épisode psychopathologique* resmiad bredkleñvedel
- *épisodes répétés de cholestase intra-hépatique icterique* resmiadoù arreat a vestlanred enavuel ikterek
- *épisodes de coma hyperammonémique* resmiadoù koma diwar wadusvec'h amoniak
- *épisodes hémorragiques* resmiadoù gwadliñvañ
- *manifestation épisodique d'une maladie chronique* erzerc'had spanaennet ur c'hleñved henek.

épisome ◇ **episom** ◇ **epizom g.** Seurtad plasmid gougevan a-wechoù ouzh ar c'hromozomoù, sk. : ar barenn F.

épispadias ◇ **epispadias** ◇ **epispadiaz g.** Kammneuziad eus kan troazh ar gourev, naouus dre lec'hiadur ezreol an igorenn anezhañ war dalbenn gein ar c'halc'h.

épissage ◇ **splicing** ◇ **spisañ** Gwezhiad hilouriezh, anezhañ, goude gouvenañ an intronou eus ur parzh kromozom, assav ar gendalc'hegezh etre an eksonoù a chom, ar re-mañ o vezañ al lodenn vonegañ nemeti eus ar c'henenn.

épistatie ◇ **epistasis** ◇ **krec'hegezh b.** Etrewered div c'henenn allreek e doare ma vir an eil ouzh eben a erzerc'hañ, anadenn heñvel ouzh an drec'hegezh nemet ma tarvez houmañ etre div c'henenn unreek (sl. *dominance*).

épistasis ◇ **epistasis** ◇ **epistaziz g.** Kammneuziad a zo anezhi bezañs mellennoù dreistniver, lec'hiet etre parzhioù bruska ha dargreiz ar mellkein; ezreolder kevret alies gant kammneuziadoù ar youlc'h hag ar fraezh.

épistaxis ◇ **epistaxis** ◇ **fronwadañ** Gwadiñv ar fri.

épistome ou adénome bronchique ◇ **bronchial adenoma** ◇ **epistom g. pe adenom g. bronkezel** Yoc'henn yud evodet diwar wagrennoù speur ar bronkez e rezh tiñvennoù o steviañ an oaled, a-wechoù oc'h ensilañ ar speur; dedreñ a ra dre resmiadoù gwadliñvañ, anforzhañ ha linañ trema ar marv dindan 10 da 20 vloaz; grevusoc'h ar furmoù ensiladek, dassesuz hag adfeillus.

épthalamus ◇ **epithalamus** ◇ **arzerc'hvel g.** Rannbarzh a-gein an treuzempenn, ouzh e ober ar c'hourjadenn hag ar sugell pergen (sl. *thalamus*).

épithéliite ◇ **epithelitis** ◇ **epiteliennfo g.** Tanijenn an epitelienn, bet deskrivet evel pazenn gentañ ar skinroc'henfo (eritem heuliet gant kouezh an ezkroc'hen).

épithélioïde ◇ **epithelioid** ◇ **epitelvanek aa.** Heñvel ouzh an epitelienn; ar c'helligoù *epitelvanek*, a gaver e gwiadoù kleñvedel 'zo, a ve leukokit darallet.

épithélioma, épithéliome, carcinome ◇ **epithelioma** ◇ **epiteliom g.** Yoc'henn yud, anezhi neradur antrevn un epitelienn, disheñvel krenn luniad he gwiad diouzh luniad nep gwiad bonan; lies seurtad zo d'an epiteliomoù, hervez rizh an epitelienn orin : *epiteliomoù gourc'hennelligel, diazelligel, kranennek*, hervez staladur ar c'helligoù : *flipezennek, pibellek, perlezennek* (sl. *adamantinome, cancer, érythroplasie, néphrocarcinome*).

épithélium ◇ **epithelium** ◇ **epitelienn b.** Gwiad pallañnañ gorre ar bevedeg hag ar c'havennoù diabarzh anezhañ; hervez staladur ar c'helligoù e teskriver an *e. unhaenek*, an *e. lieshaenek*, an *e. liac'hek*, an *e. diñsek*, an *e. granennek* (sl. *endothélium*).

épithème ◇ **epithem** ◇ **epitem g.** Nep lec'hangevezh estreget an oganoù hag ar palastroù.

épithèse ◇ **epithesis** ◇ **1 Delvosodouriezh b. 2 delvosod g.** 1 Diskiblezh a zo he amkan erlec'hiañ osodoù ouzh parzhioù an dremm (skouarn, fri, lagad, h.a.) bet kollet da heul un darvoud, un devad, ur c'hankr; he domani a gloka hini ar Surjianerezh atelviñ. 2 Osod arveret en Delvosodouriezh (sl. *chirurgie plastique, prothèse*).

épathésiste ◇ ◇ **delvosodour g.-ion** Embregour an Delvosodouriezh.

épizootie ◇ **epizootic** ◇ **darreuziad g. loenel, milzarreuziad g.** Kleñved o tizhout war un dro un niver bras loened a un pe a lies spesad.

éponychium, épionychium ◇ **eponychium** ◇ **arivinenn b.** Aspleg kroc'hen o c'holeiñ diaz an ivin (heñvelster : *gourivin* en unan eus kemeradurioù ar ger-mañ).

éponyme ◇ **1 eponymous 2 eponym** ◇ **1 anveiat aa. 2 diaranvad g.** 1 (Ster klasel) a-zivout un den, un dudenn, ur gouron, ur sant, h.a. a zo roet e anvenn d'un oberenn, d'ur geoded, h.a., sk. : Brioc zo ar sant anveiat da Sant-Brieg. 2 (Ster o vont boas) a-zivout an oberenn, h.a. roet dezhi anvenn un den, h.a., sk. : kleñved Addison zo diaranvad ar mezeg en dizoloas.

épreintes ◇ **tenesmus** ◇ **torank g.** Gwentl laurus bras e-kerz ar c'harzhañ oulennoù pa vez tanijenn er vouzellenn vras.

épreuves fonctionnelles hépatiques ◇ **hepatic function tests** ◇ **prouadoù arc'hwelel an avu** Teskad an imboure'hiou bevoniel o titouriñ stad an avu : dezventañ ar gwadvec'h bilirubin, fosfatazoù alkaliek, aminotransferazoù ALAT hag ASAT, gamma-glutamyl-transferaz, tredannizhañ protidoù ar gwadveiz, muzuliañ amzer Quick, h.a.

épreuves fonctionnelles respiratoires ◇ **lung function tests** ◇ **prouadoù arc'hwelel ar skevent** Teskad an imboure'hiou o studiañ ar gwenterezh (gwentwezañ, analventañ) hag an eskemmoù aezhel e par ar skevent.

épreuves fonctionnelles surrénales ◇ **tests functional adrenal** ◇ **prouadoù arc'hwelel uslounezhel** Teskad an imboure'hiou amkanet da zitouriñ arc'hwelerezh ar gwagrennoù us-lounezh : *dezventañ* an ACTH er plasma, ar c'hortizol er gwad hag en troazh, an aldosteron hag ar c'hatekolaminoù, prouadoù *kentraouiñ* dre an tetrakozaktid pe ar metopiron hag *astaliñ* dre an deksametazon.

épreuve, éprouver

- *épreuve au chrome 51* prouad dre ar c'hrom 51
- *épreuve d'acidification provoquée* prouad an trenkekat
- *épreuve d'hyperglycémie provoquée* prouad ar glukozusvec'hiañ
- *épreuve de Boyden* prouad Boyden
- *épreuve de charge* prouad bec'hiañ
- *épreuve de freination* prouad astaliñ
- *épreuve utilisée au cours de l'exploration* prouad arveret e-kerz an imboure'hiñ
- *éprouver des affects* anglevout kantaezadoù, kantaezañ
- *éprouver des impressions cénesthésiques* kevanglevout.

épuisement

- *douleur musculaire et sensation d'épuisement éprouvées à la suite d'un exercice musculaire important* laur kaherel ha santadur ogvez anglevet da heul un embreg kigennel start
- *épuisement nerveux et musculaire* ogvez nerval ha kaherel
- *réaction d'épuisement* erwezh diviañ
- *sensation d'épuisement* fillidigezh
- *stade d'épuisement aboutissant à la mort* stad diviañ oc'h echuiñ gant ar marv.

éputide, éputie, éputis ◇ **epulis** ◇ **epuliz g.** Yoc'henn vihan kuñv, ruz mouk, evodet diwar ribl ar munsunoù, a rizh foel, gwazhiedel pe stirek.

épuration extrarénale ◇ **dialysis** ◇ **karzhañ ezlounezhel** Anvad rumm an araezadoù kvelañ arc'hwel karzhañ al lounezh (dializiñ ampelennel, trefennañ pervezel, lounezh kalvezadel) (sl. *dialyse*).

équibration ◇ **equilibration** ◇ **1 emgempoezañ 2 kempoezañ, emgempoezañ 3 emarwastadiñ** 1 (Ent hollek) a-zivout ar bevedeg, engwezhañ an araezadoù ret evit dere'hel e arc'hwelioù e ratre. 2 (Ent kefloc'hel) kedarc'hvelañ etre ar gweled, ar benvegad rakkambrel hag an eraezhiñ endon- hag anunfrouadel amplegat da reolerezh loadur ar c'horf e-keñver ar c'hwimmoù ha lakadur parzhioù ar c'horf an eil re e-keñver ar re all. 3 (Ent vevedel) azdere'hel an arwastadiñ (Gl. *homéostasie*), eleze an tued da zerc'hel ar gwastadennoù bevedel (Gl. *constantes physiologiques*) etre o hinoù reol (sl. *déséquilibreation, homéostasie*).

équilibre ◇ **equilibrium, balance** ◇ **1 kempouez g., keventel g., keventelez g. 2 kempouez 3 kempouez, arwastadez g., arwastadiñ 4 kempouez (bred)** 1 (Ent hollek) keñver kementadel etre parennoù un arc'hwel amplegat d'an trebadout anezhañ, etre arc'hwelioù ar bevedeg amplegat d'an trebadout anezhañ. 2 (Ent kefloc'hel) arc'hwel hollek o kevreañ arc'hwelioù santadel ha loc'hadel parzhioù ar c'horf e-keñver fiñval ha loadur. 3 (Ent vevedel) azdalc'h ar gwastadennoù bevedel etre o hinoù reol (sl. *homéostasie*). 4 (Ent vredel) termen letere'hadek kaozeek heñvelster da "yec'hed bred", arveret ent nac'hek da verkañ an ezvezañs a wariadurioù neuzid pe realezh.

équilibre nutritionnel ◇ **nutritive equilibrium** ◇ **kempouez mezhurel, keventel boued** Stad kefleuniet pa vez an enankañ mezhurel e rezh kalorioù, maguzennoù, vitaminoù ha dour o vastañ da ezhommoù ar bevedeg en aoziou m'emañ (sl. *bilan, déséquilibre alimentaire : syndrome du ~*).

équilibr-

- *échange équilibré de matériel génétique* eskemm kevatalek dafar hilel
- *équilibre acide-base* kempouez trenkenn-bazenn
- *équilibre cinétique* mental gorzh
- *organe membraneux horizontal participant à la fonction d'équilibration* organ liennnek azremm o perzhiañ en arc'hwel ar c'hempoezañ.

équimolécularité ◇ **equimolecularity** ◇ **keitvol g.** Stad div zileizhenn a zo par o bec'h mol.

équín ◇ **equine, equinus** ◇ **1 marc'hel aa. 2 rakkamm aa.** 1 A-zave d'ar mirc'hed, sk. *empennfo marc'hel amerikan* (Gl. *encéphalite équine américaine*). 2 Gant ar rakkammed.

équínisme ◇ **equinism** ◇ **rakkamm g., rakkammed b.** Lakadur padennek pe trebadek an troad war bleg a-sol diwar drec'hded kigennoù pleger a-sol an troad (kigenn drifennek ar c'har pergen).

équivalent ◇ **equivalent** ◇ **kevatal g. -ioù** Anaez a roer dezhañ an un talvoud nozologek hag un anaez all ; da skouer, sifern ar bleuñv a seller evel ur c'hevatal d'an astma.

équivalent-gramme ◇ **equivalent-gram** ◇ **tolz mol kevatal** Rannad an tolz mol dre an amsav.

équivalent respiratoire ou **ventilatoire, ER_{O2}** ◇ **ventilatory equivalent, Veq** ◇ **kevatal gwentadel, Kgw** Ec'honad aer a rank bezañ gwentet evit ma savfe ar beveziñ oksigen da ul litr (ent reol 25 L).

éradication ◇ **eradication** ◇ **ezvoudañ** Steuziadur klok ur c'hleñved e par ar blanedenn ; da ziforc'hiñ diouzh an *ezvevennañ* (Gl. *élimination*) a zo steuziadur ur c'hleñved en ur rannved pe ur vroezenn.

Erasmus : **syndrome d'~** ◇ **Erasmus' syndrome** ◇ **azoniad Erasmus** Kevreted silikoz ha skleroderma, paot gant ar vengleuzierion ha grevus : dedreiñ a ra herrek d'ar skorted analadel ha d'ar galon skeventien henek.

Erb : **paraplégie d'~** ◇ **Erb's spastic spinal paraplegia, Erb's palsy** ◇ **treuzseizi g. Erb** Furm treuzseizi dasstrizhek argreskus melien, kevredet gant strafuilhoù ar c'helc'hstrishaerioù, ansavelet he orin.

Erdheim : **syndrome d'~** ◇ **Erdheim's syndrome** ◇ **azoniad Erdheim** Seurtad remm o tarvezout e-kerz ar geurvleñchegezh, naouus dre dizhadur hanbarek ar mellkein hag an arzoù migern-kostoù.

érecteur ◇ **erector** ◇ **sonner aa.** Oc'h ober sonnañ ; *kigenn sonner* (Gl. *muscle érecteur*) a reer eus ar gignenn kevreet gant pep blevn oc'h ober dezhi sevel en erwezh ouzh kentrigennoù 'zo (ar yenion, ar from) ; *nervenn sonner* (Gl. *nerf érecteur*) eo anvad kent an *nervennoù splanknek a-lestr* pe *nervennoù ar sonnañ*.

érectile ◇ **erectile** ◇ **sonnidik aa.** En araez da sonnañ, termen arveret ent vevedourel (*organ sonnidik*) hag ent kleñvedourel (*yoc'henn sonnidik talmus*) (sl. *anévrisme cirsoïde, dysfonction érectile*).

érection ◇ **erection** ◇ **sonnidigezh b., sonnañ** Anadenn o c'hoarvezout gant organoù 'zo (kalc'h, ellig) o vont reut ha kalet dre berzh lanvidigezh ar gwad en o gwazhied.

érep sine ◇ **erepsin** ◇ **erepsin g.** Enzim bezant e sug ar pervez hag en organoù diseurt (lounezh, avu, skevent, felc'h), e wered treuzfurmiñ ar polipeptidoù en amindrenkennoù.

éréthisme ◇ **erethism** ◇ **angrid g.** Usvroudadusted un organ, sk. : *angrid ar galon*, anvad all azoniad ar *galon hegeuziek* (sl. *cœur irritable, convulsion 2*).

éreuthophobie ◇ **ereuthophobia** ◇ **arur g. ar ruziañ, ruziadarur g.** Amgren enkreuz da ruziañ, kevret gant ar ruziañ end-eeun (sl. *érythrophobie*).

ergographe ◇ **ergograph** ◇ **gremmwezer g. -ioù, ergograp g. -où** Ardivink amkanet da lerc'hwezañ labour ar c'higennoù ha da lakaat war wel dianlenadoù ar skuizhvez pe ar c'hleñved.

ergomètre ◇ **ergometer** ◇ **gremmventer g. -ioù, ergometr g. -où** Ardivink amkanet da vuzuliañ labour ar c'higennoù (sl. *bicyclette ergométrique*).

ergonomie ◇ **ergonomy** ◇ **c'hwelaozouriezh b.** Imbourc'hiñ aozioù al labour war-benn o c'hevazasaat diouzh gallusterioù an den.

(-)erg-

• *adrénergique* adrenwerc'her • *allergie* allergiezh • *alpha-adrénergique* alfafraouaer • *anergiezh* anergie • *antidopaminergique* dopamindolc'her • *asynergie* ankedal • *bioénergétique* bevc'hremmoniezh • *brillance énergétique* gremmsked • *cholinergie* kolinwerc'hañ • *cyclo-ergomètre* jav gremmventer • *disposer le système d'affichage de la façon la plus ergonomique possible* stalañ an trevnad gwereañ en doare c'hwelaozekañ gwellañ • *énergie cinétique* gremm fiñvek • *force vitale, énergie, tonus, sthénie* nerzh bevedel, eniñv • *haute énergie* uhelc'hremm • *le but de l'ergonomie est de modifier le travail de façon à l'adapter à l'être humain* pal ar c'hwelaozour eo argefenañ al labour diouzh doareoù mab den • *récepteur adrénergique* adrenvuzer • *synergie* kedal, kedalañ.

ergostérol, provitamine D₂ ◇ **ergosterol** ◇ **ergosterol g., provitamin g. D₂** Sterol bezant e druilh ar segal hag er goell bier ; dindan ar skinoù dreistmouk e tro e kalkiferol (vitamin D₂).

ergot de seigle, Claviceps purpurea ◇ **ergot** ◇ **druilh g. ar segal** Foue arvevat ouzh ar segal, kiriek da vikotoksikozioù (ergotegezh) ; diwarnañ ez eus bet aozet un niver liaoù (ergotamin, bromokriptin, h.a.).

ergothérapie ◇ **ergotherapist** ◇ **bregurour g. -ion** Eiler mezegel a zo e gefridi heforzhañ an oberiezhoù breadel.

ergothérapie ◇ **ergotherapy, occupational therapy** ◇ **bregurañ, yac'haat breadel** Pourchas emelloù dornwezhel, dornarzel, h.a. d'ar c'houziavaded kurdiet en amboaz stourm ouzh an digenemprañ kevredigezhel.

ergotisme ◇ **ergotism** ◇ **druilhegezh b., ergotegezh b.** Hollad an darvoudoù dec'hanet gant bevezadur hirbad ar segal druilh : strafuilhoù nerval (glizi, trezerc'hioù, ambren, kefroù), koazhadel (darc'hoal, c'hweladoù), breinged, h.a.

érosion, exulcération ◇ **erosion** ◇ **graspad g., graspiñ** Bliad gorre ar c'hroc'hen pe ur glaourgenn (sl. *abrasion, excoriation*).

érotomanie ◇ **erotomania** ◇ **serc'hvreadezh b.** Furm baranoia, anezhi an angred ambreek a vezañ serc'het gant un den all, o tedreiñ ent klasel hervez tri frantad : goanag, kerse, droukrañs.

errance ◇ **wanderlust** ◇ **emdeadezh b.** Tued gant tud yaouank da vont en hent hep pal estreget ar bliz da gantren pell vro ha pell amzer ; gouzrec'hioù an emdeadezh eo an *emdead g. -ed*, an *emdeadez b. -ed*.

erratique ◇ **erratic** ◇ **1 valigant** aa. **2 kantreidik** aa. **3 allec'hiat** aa. **4 distrewat** aa. 1 A-zivout un anadenn gleñvedel, o kemmañ-digemmañ en he c'hreñvder, en aliested hag e padelezh he resmiadoù, sk. *terzhienn valigant*. 2 O kemmañ-digemmañ lec'h, sk. *laurioù kantreidik*. 3 A-zivout un anadenn gleñvedel, ur yoc'henn, oc'h anadiñ pell pe belloc'h diouzh ar gwiad a evod dioutañ, sk. : *endometriom allec'hiat*. 4 A-zivout kelligoù kleñvedel dilec'hiet pell diouzh o fennsez, sk. : *kelligoù kankrek distrewat*.

éructation ◇ **eructation** ◇ **breugeud** g., **breugeudiñ** Disteurel gant trouz aezhenn eus ar stomok dre ar genoù.

éruption ◇ **eruption, rash** ◇ **1 dispuilh** g., **dispuilhad** g., **dispuilhañ** **2 nodadur** g., **nodañ** 1 Anadiñ war ar c'hroc'hen, pe brizhennoù (ruzadoù, purpura), pe elfennoù luniek (c'hwezigennoù, filboc'henoù, h.a.) gant pe hep terzhienn; ar ruzad heñvel ouzh dispuilhad ar skarlegenn pe ar ruzell, o tont trumm ha berbbad avat, a reer anezhañ ur *yazad* (Gl. *rash*). 2 Sevel an dant.

érysipélateux ◇ **erysipelatus** ◇ **1 tangouezek** aa. **2 tangouezeg** g. **-eion** **3 tangouezel** aa. 1 Gant an tangouez. 2 Gouziviad an tangouez. 3 A-zave d'an tangouez.

érysipélateoïde ◇ ◇ **tangouezvanek** aa. A-zivout un anaf kroc'hen, a neuz heñvel ouzh plakadoù an tangouez.

érysipèle ◇ **erysipelas** ◇ **tangouez** g., **erizipel** g. Kroc'henfo poreel lemm diwar strepokok, naous dre blakadoù gouliñvek ruz kantet gant un andell, sezet war an dremm pe war ur c'har, kevredet gant arouezioù hollek garv; furmoù klinikel zo d'an tangouez : *t. kantreidik*, *t. aremstlej*, *t. staenek*, *t. morferek*.

érysipéloïde, érysipelothrix ◇ **erysipeloid** ◇ **erizipeloid** g. Kroc'henfo micherel (kigerion, charkuterion, peskerion, loenvzeion) diwar vazhell terzhienn ruz ar moc'h (*Erysipelothrix rhusopathiae*), naous dre ur plakad glasruz laurus war ur biz oc'h emastenn d'an dorn, a zedroadur kuñv.

érythème ◇ **erythema** ◇ **eritem** g. 1 Ruzded darwazhiak ar c'hroc'hen diverkadus dre ar gwerennwaskañ. 2 Anvad rumm an dermatozioù a zo an eritem o anaf elfennel hep darallad all eus an ezkroc'hen ha hep ensiladur teutadus.

érythème automnal ◇ **erythema fall** ◇ **eritem an dianeost** Ruzded kevredet gant un debron ferv diwar dantadur ha halv ar mederig (pe gwrec'h Eost, *Thrombidium holosericeum*) (sl. *bête rouge des Antilles*).

érythème chronique migrateur ◇ **erythema chronicum migrans** ◇ **eritem henek kilhataer** Dispuilhad oc'h emastenn prim en dro da flemmad un deureugenn, o vont war furn un andell walennek a 30 da 50 cm trogelc'h a chom un nebeut mizvezhioù kent steuziañ.

érythème du 9^e jour ◇ **Milian's erythema** ◇ **eritem an 9^e deiz, eritem Milian** Eritem ruzellvanek, skarlegvanek pe ruzigvanek o tarvezout e-tro nav deiz goude deroù ur c'himigurañ (barbiturek, sulfamidek pe all) hag o steuziañ hep dale pell; e zisplegañ a reer dre un angougemer pe un allergiezh.

érythème induré de Bazin ◇ **Bazin's disease, erythema induratum** ◇ **eritem argalet Bazin** Dermatoz o c'hoarvezout eus ur plakad ruzvouk, ensilet, yen, ozvennoù fetis a-strew warnañ, sezet war an divesker, o tizhout ar plac'hed yaouank; alies e tisoc'h dre un dedro goulemm gant angreizhoù diek ha kilvers; goulakaat a reer un arbenn amredel pe enborc'hadel.

érythème noueux ◇ **erythema nodosum** ◇ **eritem ozvennek** Dispuilhad ozvennoù tonenn-goudonenn a vent ur graoñenn, balirek, ruzvouk, fetis ha laurus ouzh ar pouezañ, sezet dreist holl war an divesker, an treid hag a-wechoù war an divvrec'h, kevret gant terzhienn hag arzostoù, o tedreñ war 10 da 20 deiz en ur dremen dre lerc'hiad arlivh arbrondi; ent klasel ez eus anezhañ ur furn eus ar c'hentporead torzhellek; hiziv en en intenter evel un erwezh allergek ouzh antígenoù pistril pe boreel.

érythème polymorphe, érythème exsudatif multiforme ◇ **erythema multiforme, Hebra's disease** ◇ **eritem lies-neuz** Azoniad naous dre un dispuilhad krugennek ha gouliñvek, c'hwezigennoù ha gloevennoù stallet e stumm kokardennoù a-wechoù, sezet war an daouarn, an divarvrec'h, an daouilin hag an daoulin; anaez kuñv, o tedreñ d'ar pare dindan div sizhun, oc'h adfeilhañ aliezik avat; kevarguzet emañ arbenn an eritem liesneuz pa intenter hemañ gwech evel ur pore rannvloaziek, gwech evel un dermatoz devoudet gant gwezherioù garvevel, foueel pe bistril; furmoù 'zo terzhiennek gant dispuilhad paoterek a nesaer d'an ektodermoz graspadek liesigorennel (sl. *ectodermose érosive pluri-orificielle*).

érythème pudique ◇ **erythema modest** ◇ **eritem a'r gouezel** Dispuilhad steuzidik maelennoù ruz o tarvezout war gerc'henn ar maouezed kizidik da geñver o fromadennoù.

érythémogène ◇ **erythemogenic** ◇ **eritemeiat** aa., **eritemogen** aa. O tec'han an eritem.

érythraphérese ◇ **erythrapheresis** ◇ **ruzedrannañ** Dispartiañ hag eztennañ an eritrokit eus ar gwad (sl. *cytaphérese*).

érythrasma ◇ **erythrasma** ◇ **eritrasma** g. Kleñved kroc'hen naous dre blakadoù melen azgell sec'h sezet en toulloù kazel hag er plegoù barlenn, desellet gwechall evel un epidermomikoz, a zo e gwir kiriek dezhañ un hadenn eus ar genad *Corynebacterium*.

érythémie, maladie de Vaquez, polycythémie vraie, polyglobulie primitive essentielle ◇ **polycythaemia vera** ◇ **elruz** g. **hennadek** Kleñved dianav e arbenn, naous dre usniver an hemati (etre 7.10⁶ ha 9.10⁶ dre mm³) a-geñver gant ur gwezhierezh reñverek eus ar mel eskern, a renker e stern an *azoniadoù melneriñ*; marvus dindan 10 pe 15 vloaz dre dromboz pe dre leukemiezh; an drobraso a c'horrekaer dre wadadoù, kimigurañ pe skinobergurañ (⁶⁰Co, ³²P).

érythroblastés ◇ **erythroblasts** ◇ **eritroblast** s. Kelligoù diaraoger an hemati, oc'h ober etre 20 hag 25 % eus elfennoù kraoñellek mel an eskern, oc'h evodiñ diouzh ar proeritroblast (bongelligoù an ac'had) hag oc'h azviñ bep ma vez enaozet an hemoglobin e-barzh o frotoplasm : bazennlen da gentañ ez eont da drenkennlen tra ma tigrsek o zreuzkiz eus 18 µm da 9 µm, ma kollont o c'hraoñell ha ma treuzfurmont e retikulokit pe hemati yaouank.

érythroblastémie ◇ **erythroblastemia** ◇ **gwaderitroblastegezh** b. Bezañs eritroblast er gwad, kevret alies gant ar wadvel-egezh.

érythroblastique ◇ **erythroblastic** ◇ **eritroblastek** aa. A-zave d'an eritroblast pe d'an ac'had ruz.

érythroblastique ou **érythrocytaire** : **lignée** ou **série** ~, **érythron** ◇ **erythrocyte series**, **erythron** ◇ **ac'had** g. **eritroblastek**, **ac'had eritrokitek**, **ac'had ruz**, **ruzac'had** Heuliad ar c'helligoù yaouank oc'h azviñ hag o neriñ e-barzh mel an eskern betek disoc'h gant ar c'helligoù ruz odour (eritrokite pe hemati);

érythroblastopénie ◇ **erythroblastopenia** ◇ **oleritroblast** g. Gorrekaat pe astaliñ furmidigezh an hemati diwar ur mieloz angweel; gant an oadourion, evit 50 % eus an degouezhioù, e tarvez e dianlen ur yoc'henn eus an toazon o tec'han distruj an eritroblast dre ur wikefre unanhangaeel (sl. *anémie aplastique*).

érythroblastose ◇ **erythroblastosis** ◇ **eritroblastoz** g., **eleritroblast** g. Usniver an eritroblast er mel eskern hag a-wechoù bezañs anezho er gwad.

érythrocyanose des jambes ou **sus-malléolaire**, **adiposité cyanotique de Milian** ◇ **erythrocyanosis** ◇ **eritrokianoz** g. **an divesker**, **behinegezh** b. **dulazek (Milian)** Anaerz o tizhout ar c'hrennardezed, naouus dre an dulaz, ensiladur toazennek ha yenadur ar c'hroc'hen eus tredereñ draoù o divesker (sl. *acrocyanose essentielle*).

érythrodermie ◇ **erythroderma** ◇ **eritroderma** g. Anvad rumm kroc'henfoioù a zo da bennazon dezho ur ruzder astennet d'ul lodenn vras eus ar c'horf, kevret gant ar gourc'hennadur, lies seurtad anezho : an *eritem skarlegvanek* (Gl. *érythème scarlatiniforme*), o tedeñ evel ur pore lemm hag o parañ dindan 15-20 deiz; ar *c'hroc'henfo dispelius hollek goulemm pe henek* (Gl. *dermatite exfoliative généralisée subaiguë ou chronique*), naouus dre ur gourc'hennadur bras, darallad ar stad hollek hag un dedro hir, marvus a-wechoù; *pitiriasis rubra Hebra*, dibaot, o tedeñ gorrek trema ar fallezh gant tevadur, angrizadur, anteñvadur ha skarradur ar c'hroc'hen; an *eritroderma gloevennek gant eskroc'henloez* (Gl. *érythrodermie bulleuse avec épidermolyse*), pistriel (angougemer ar sulfamidoù, an enepfoeier), poreel (stafilokok aourliv), a ro d'ar c'hlañvour neuz un deved bras o c'houzañv strafuilhoù dourkevionel ha dreistporeadoù grevus, alies marvus; an *eritroderma gourc'hennus ar magadelled* (Gl. *érythrodermie desquamative des nourrissons, maladie de Leiner-Moussous*), gourc'hennadur lavnennek o tizhout ar c'horf a-bezh e-kerz daou vizevezh kentañ an hoali, ambrouget gant strafuilhoù koazhadel ha darallad don pe donoc'h ar stad hollek, kleñved e dalc'h moarvat un direzh hêrezhel eus reizhiad ar glokaenn.

érythrodontie ◇ **erythrodontia** ◇ **dentrozegezh** b. Livrezh roz pe roz-gell o tont war an dent, a stader a-wechoù gant gouzviaded ar borfiriezh (sl. *porphyrie*).

érythrokrátodermie ◇ **erythrokeratoderma** ◇ **eritrokeratoderma** g. Dermatoz naouus dre blakadoù ruz ha gourc'hennek, bezant war ar palvoù hag ar solioù treid.

érythroleucémie, **érythroleucose** ◇ **erythroleukaemia** ◇ **eritroleukemia** g. 1 Kevreted elruz ha leukemiezh o tedeñ en ur ser. 2 Resmiad elruz o tarvezout dibaot e prantad olañ al leukemiezh.

érythromélgie, **érythromalgie** ◇ **erythromalgia** ◇ **ruzost** b. **ar bleñchoù** Anaerz naouus dre resmiadoù lauriñ, koeñviñ ha ruziañ an amwiskadoù en eizhaenoù, en treid pergen; rummet e vez evel strafuilh gwazhiedloc'hadel arc'hwele e-kichen ar vleñchost ha kleñved Raynaud; *ruzost ar penn* (Gl. *érythromélgie céphalique*) zo un anvad all eus *azoniad Horton* (sl. *acromélgie, céphalée vasculaire de Horton, maladie de Raynaud*).

érythropathie ◇ **erythropathy** ◇ **ruzanaez** g. Kleñved an hemati.

érythropénie ◇ **erythropenia** ◇ **olruz** g. Leiadur bras niver ar c'helligoù ruz.

érythrophagocytose, **érythrophagie** ◇ **erythrophagia** ◇ **eritrofagiezh** b. Fagokitoz bonan pe gleñvedel ar c'helligoù ruz gant ar makrofag, ar monokit, an histiokit.

érythrophobie ◇ **erythrophobia** ◇ **ruzarur** g., **arur al liv ruz** Amgren enkreuz da welout traezoù ruz (sl. *éreuthophobie*).

érythroplasie ◇ **erythroplasia** ◇ **eritroplaziezh** b. Anaf rakkankrek ar glaourgennoù (genoù, teod, divweuz, mezenn, beskenn, youlc'h) dezhañ neuz ur gorread ruz, voulouzek, lufi, hevonn strizh, oc'h emastenn gorrek, o herzel ouzh an holl lec'hangevezhioù hag o tedeñ trema un epiteliom gourc'hennelligel gant c'hwarrrenn genrat.

érythropoièse ◇ **erythropoiesis** ◇ **ruzparañ** Furmiñ ar c'helligoù ruz e-barzh mel an eskern.

érythropoiétine, **EPO**, **hémopoiétine** ◇ **erythropoietin** ◇ **eritropoietin** g. Glikoprotein borc'het gant al lounezh dreist holl, o kentraouiñ paridigezh ar c'helligoù ruz; anadiñ a ra e gwadveze fonnek; astalet e vez ar borc'hañ anezhañ gant ar reñver oksigen er gwiadoù ha fraouaet gant an isvec'h oksigen; an EPO kevanaozet dre hlorouriezh a arverer da brederiañ amwad an dializidi; bet diounezet d'ar sportourion evit derc'haviñ o askoradoù, ez eo bet diskleriet an danveziñ anezhañ evel pisterezh gant ar *World Anti-Doping Agency*, alese berzet ha handalet.

érythropsie ◇ **erythropsia** ◇ **ruzarnewel** g. Kammzerc'hañ un arliv ruz war an traoù a weler (sl. *chromatopsie*).

érythropsine, **pourpre rétinien** ◇ **erythropsin** ◇ **eritropsin** g., **moug** g. **al luc'hsae** Livegenn ruz bezant e kegeliou al luc'hsae, o kevaraezañ ar gweled amhelel (fotopek), anezhi ur c'hromoprotein, ouzh e ober ul livegenn, ar *retinen*, deveret diouzh ar vitamin A, hag ur protein, an *opsin*.

érythrorrhéxis ◇ **2 erythrorrhéxis** ◇ **1 gwadliñv** g., **gwadliñvañ** **2 ruzedvidañ**, **eritrorreksiz** g. 1 Skuilh gwad e-maez ur wazhiedenn. 2 Dastammañ ar c'helligoù ruz.

érythrose ◇ **erythrosis** ◇ **ruziadezh b., eritroz g.** Livrezh ruz an amwiskadoù a stader e meur a glañvadur : usniver an hemati, ar midant nervstruzhel; sezet en dremm hag er c'herc'henn ez eo naouus d'an akne livrin; *ruziadezh an dianaou* (Gl. *érythroze de déclivité*) a zeskriver evel azon ar gourwad dassavel.

érythurie ◇ **erythuria** ◇ **troazhruzegezh b.** Livrezh an troazh diwar vezañs an hemoglobin pe ul livegenn ebarzhet er bevedeg.

(-)**éryth-**

• *anérythropisie* ruzangwel • *augmentation de l'érythropoïèse* ruzuspar • *dysérythropoïèse* ruzvibar • *érythématopultacé* yod-eritematus • *érythrocytes, hématies, globules rouges*, eritrokrit, hemati, kelligoù ruz, ruzkelligoù • *érythrodiapédèse* ruzzregenk • *lupus érythémateux* lupuz eritematus • *peaux sèches, érythrosiques et couperosées* kroc'henoù sec'h, eritrozek ha bourbonek.

escalier : signe de l'~ ◇ **stairs sign** ◇ **arouez b. an diri** Bec'h o tiskenn gant an diri, ragazon eus digenurzh ar fiñvoù, o reiñ tro da zezaouiñ an tabez.

escarre ◇ **slough, eschar** ◇ **eskar g. -où** Trouskenn diwar heskwad, marvenn ar gwiadou gorre o treiñ e breinged sec'h pe poreet; stadet peurliesañ e rezh *eskar ar gourvez* (Gl. *escarre de décubitus, Sz. bed-sore*).

escarification ◇ **sloughing** ◇ **eskaraat** Furmiñ an eskar.

ésérine ◇ **eserine** ◇ **ezerin g.** Alkaloid douhennet eus fav Kalabar (greun eus ur genad troell afrikan, *Physostigma venenosum*), ezniñver ar c'holinesteraz, vagomimetek, fraouer al loc'hañ pavezal ha troazhadel; mabisvollus, en en diounezer dre gollir ouzh ar glaokom.

Esmarch : bande ou appareil d'~ ◇ **Esmarch's bandage** ◇ **bandenn b. Esmarch** Anroad o c'hoarvezout eus ur vandenn dastennek a buner war viñs en dro d'un ezel adalek e benn pellek betek e benn nezek evit kas ar gwad dioutañ.

ésophorie ◇ **esophoria** ◇ **engwilc'hañ** Ankensteud engwar enkelat, eleze na anataer nemet dre un ardivink o lakaat a-geñver bukadurioù an daou lagad (sl. *exophorie*).

ésotropie ◇ **esotropia** ◇ **engwariañ** Ankensteud engwar diskelat, loakrerezh engwar.

espace épidual ou sus-dural ou extradural ◇ **extradural space** ◇ **kavenn war-dev** Rannbarzh loet etre ar bilhonenn dev hag an eskern (klopenn ha mellennoù).

NOTENN : E galleg, ent klasel, e reer *espace épidual* eus rann ar gavenn war-dev loet er mellkein hag *espace extradural* eus ar rann loet er c'hlopenn; a du 'rall, ez arverer an adanv *péridural* evit an dieraezñ (sl. *anesthésie épidurale, dural, dure-mère*).

espace mort respiratoire ◇ **respiratory dead space** ◇ **ec'honenn b. soc'h analadel** Rann eus ar forzhioù analañ ma ne c'hoarvez ket eskemmoù etre an aer hag ar gwad; diforc'hiñ a reer *a*) an *e. s. korfadurel* (Gl. *e. m. anatomique*) gavalet adalek ar fri hag ar genoù betek ar c'horrvronkez dibenn (ent vonan etre 100 ha 200 mL ec'honad); *b*) an *e. s. bevedourel* (Gl. *e. m. physiologique*), da ec'honad dezhi sammad hini an *e. s. korfadurel*, hini al logigoù aneroeriet dre arbennoù kleñvedel ha hini an aer enanalet dreist ezhommoù an oksigenañ; *c*) an *e. s. logigel* (Gl. *e. m. alvéolaire*), da ec'honad dezhi an diforc'h etre ec'honadoù an *e. s. bevedourel* hag an *e. s. korfadurel*.

espace

• *accumulation de sécrétions dans un conduit ou un espace anatomique* hogennad borc'hadoù en ur ganol pe un ec'honenn gorfadurel • *épanchement gazeux dans l'espace, normalemnt virtuel, entre la plèvre pariétale et la plèvre viscérale* fennad aezhenn en egorenn, gorreek ent reol, etre ar grezenn a-speur hag ar grezenn afluhez • *espace compris entre la plaque choriale et la lame basale* esaou gavalet etre haen gorion ha haen diaz an dorzhienn • *espace environnant le corps, espace extracorporel* amegor • *espace épidual* kavenn war-dev • *espace extracellulaire* ec'honenn ezkelligel • *espace intercostal* tachad etre-kostoù • *espace sous-dural, espaces sus-arachnoïdiens* kavenn endan-dev • *espaces sous-arachnoïdiens* kavenn endan-gevnidek • *existence d'un espace anormal entre les surfaces occlusales* bezañs un esaouenn ezreol etre an talbennoù keharzel • *les quantités de chaleur en mouvement dans un espace clos* ar gwrezadoù en arloc'h en un ec'honenn gloz • *région de l'espace où se manifestent des forces* egorenn ma wered nerzhoù.

esquille ◇ **splinter of bone** ◇ **sklisenn b.** Skeltrenn askorn en torroù bruzunek.

essai thérapeutique ◇ **therapeutic trial** ◇ **proud g. yac'hadel** Hentenn studiañ ul lia nevez e-skoaz ul lia kent pe an ezvezañs prederiadur; evit ma ve solius e ranker divrannañ ar c'houziviaded dre ziforzhekaat, an eil stroll o tegemer al lia, egile o tegemer ur plakebo; er *proud hep rat* (Gl. *e. t. à l'insu, Sz. blind test*) e chom ar gouziviad hep gouzout natur an aozad en deus kemeret; er *proud daskroaziat* (Sz. *cross-over test*) e vez diounezet d'un an gouziviad lerc'h ouzh lerc'h lia ha plakebo pe plakebo ha lia, hag eñ dic'houzvez eus urzh an diounit, dezhañ da varn ar gweredoù; er *prouad ueheprat* (Gl. *essai en double insu, Sz. double blind test*) e tiounezer d'ar gouziviad gwech ur plakebo, gwech al lia gwirion, hep rat ken dezhañ, ken d'ar mezeg, un tredeour hepken oc'h anaout bewech natur an aozad diounezet.

essence, huile volatile, huile essentielle ◇ **essence** ◇ **irad g. -où** Teskad kemplezh aozadoù aezhidik frondek tennet eus organoù plantel (bleuñ, frouezh, delioù) dre galvezderioù diseurt (douhenniñ, gwaskañ, glec'hiañ, meizhiañ, strilhañ), a zanvezer e-barzh angevezhioù evel dilester pe evel ambrogenn groc'henoù en askont d'e c'halloud intrusaat uhel.

essencisme ◇ ◇ **iradegezh b.** Pistriadur gant diedoù iradek, evel an absint.

essentiel ◇ **essential** ◇ **hennadek** aa. (keal nozologek) a-zivout un anaez, un azoniad pe un azon na c'haller ober seiz warnañ evel lodek e kleñved savelet ebet; dre astenn ster, azivout ur stad kleñvedel na anavezet ket an arbenn anezhi, sk. : *dulaz hennadek ar bleñchoù* (Gl. *acrocyanose essentielle*) (sl. *idiopathique, primitif*).

esthésie ◇ **aesthesia** ◇ **eraeziñ** Santout er c'hemeradur bevedourel, termen o vont alies da lostrann, sl. *doneraeziñ* (Gl. *sensibilité profonde*), *gwaskeraeziñ* (Gl. *baresthésie*).

esthésiomètre ◇ **(a)esthesiometer** ◇ **eraezandaler** g. **-ioù** Ardivink da brizañ an eraeziñ stokadel, sk. : *eraezandaler ar gornsaë* (Gl. *esthésiomètre cornéen*).

esthésioneuroblastome ◇ **(a)esthesioneuroblastoma** ◇ **estezoneuroblastom** g. Yoc'henn yud dibaot kaer o tizhout ar vugale pe an oadourion yaouank, evodet diwar elfennoù nerval glaourgenn ar fri manet pe distroet er stad rizhellel.

estomac ◇ **stomach** ◇ **stomok** g., **kreuz** g. Lodenn frankaennek eus ar ganol vezhur etre an treizher (etrezo ar gwask krec'h) hag an daouzegenn (etrezo ar porzhier), ouzh he ober an deun, parzh krec'h kleiz ledan, ar c'horf kendalc'het gant mougev ar porzhier; d'e zeskrivañ e tiforc'her daou dalbenn, araok hag adreñv, ha daou ribl, ar c'hrommadur bras a-gleiz, ar c'hrommadur bihan a-zehou; en e speur ez eus kigennoù galloudek ha gwagrennoù o vorc'hañ ar pepsin hag an drenkenn glorhidrek.

établ-

- *admettre dans un établissement de soins médicaux* darbenn en ur c'hurdi, kurdiañ
- *admettre dans un établissement médical ou social* darbenn en un diazevadur mezegele pe waredvezegele, herberc'hiañ
- *établir légalement, décréter* devedañ
- *rétablir la perfusion sanguine dans la grande circulation* adsavelañ erfenn ar gwad en amred trogorfat
- *établir une relation avec autrui* savelañ un darempred ouzh an amgen
- *établissement de cure kurdi*
- *établissement d'hébergement des personnes âgées dépendantes, EHPAD* herberc'hti an henaded amzalc'hiat, HHA
- *établissement privé ou public* diazevadur prevez pe foran
- *établissement de soins kurdi*
- *établissement médical ou social comportant des lits* herberc'hti.

étanche

• *mise en place d'un clamp sur le vaisseau ou le viscère que l'on désire rendre étanche* desezañ ur c'hlamp ouzh ar wazhiedenn pe ar flugezenn a venner anforzhañ.

état de mal ◇ **subinçant crisis** ◇ **aroad** g., **barradoù kevarlank** Lerc'hiad grezvarroù o tont ken nes an eil da heul egile ma ne zistro ket ar gouziviad d'ur stad reol.

état de mal asthmatique ◇ **status asthmaticus** ◇ **aroad asma** Skorted analadel lemm diwar ur bronkezandag padek o tec'han logigiswent.

état de mal épileptique ◇ **status epilepticus** ◇ **aroad droukfell** Furm droukfell deznaouet pa zarvez ur barrad hirbad pe ul lerc'hiad barradoù gant entremeziou re verr evit ma tistofe ar gouziviad d'e genskiant; ent klasel ne raed anv eus aroad droukfell nemet evit an droukfell hollek, hiziv e teskriver kement seurtad aroadoù hag a seurtadoù droukfell : *aroad droukfell darnek* (Gl. *état de mal partiel*, Sz. *status epilepticus partialis*), *aroad droug bihan* (Gl.Sz. *petit mal status*), h.a. (sl. *épileptique : état de mal* ~).

état de mal angineux ◇ **unstable angina** ◇ **aroad kalonank, kevenkez** g. **distabil** Azoniad naouus dre varradoù kevenkez bruched lies ouzh lies, hir ouzh hir, dre arouezioù barrwezadel heskad ha dre arouezioù kurunerlunadel isvoll start war un pe lies kurunerenn; grevus eo an dedro emdarzh ha, gant riskl an angwazhiad hag ar marv trumm, e ranker alies divizout diwar zirfrae ur pontañ pe un atelviñ kurunerenn evit azgwazhiediñ ar c'haheer kalon.

état de rêve ◇ **dreamy state** ◇ **stad lederrizhañ** Azoniad bredel naouus da erzerc'hadoù droukfell 'zo; ar gouziviad, o terc'hel pe o koll skiant eus e amved, a c'houzañv kammzerc'hioù ha trezerc'hioù a neuz gant an hunvreoù (lederrizhadoù).

état

- *état adulte* stad oadour, oadouriezh
- *(état de) choc* bleuz
- *état ébrioux* mezed
- *état général* stad hollek, stuz hollek
- *état larvaire* stad larvel
- *parasite ou vivant à l'état libre* arvevat pe rezvevat
- *l'état d'ouverture du canal ionique dépend de la polarité de membrane* emañ digordet an iongan e dalc'h bleinegezh ar gennenn
- *période d'état, acmé, climax* bog, bogvezh, pazenn vog.

étend-

- *excision d'une portion plus ou moins étendue du septum* gouvenañ ur parzh ledek pe ledekoc'h eus an dilhenn
- *exèrèse étendue à certains organes voisins* ezvenañ astennet da organoù nes
- *inflammation phlegmoneuse entraînant une nécrose étendue* tanijenn vorferek o tevoudañ ur varvenn ledek
- *l'étendue du spectre* lec'hed ar skalfad
- *la cause et l'étendue de l'inflammation* arbenn hag astenn an danijenn
- *nécrose musculaire étendue* marvennad ledek ar c'haheerioù.

étournement ◇ **sneezing** ◇ **streviañ** Ezvoutañ damougek kreñv ha trouzus aer ar skevent dre ar fri hag ar genoù, delanket peurliesañ gant hegadur glaourgenn ar fri.

éthérisme ◇ **etherism** ◇ **eteregezh** b. Teskad an anadennoù nerval ha bredel diwar euvriñ an eter e rezh burezh (*eteriñ*) pe died.

éthéromanie ◇ **etheromania** ◇ **eterestoue** g. Kaezhiadezh ouzh an eter.

éthique ◇ **ethics** ◇ **1 Divezoniezh** b. **2 Divezouriezh** b. 1 Rann eus ar Brederouriezh o plediñ gant finvezioù ar vuhez hag ar moned diouto. 2 Teskad ar reoladoù darbennet evit ren ar vuhez hag ar gedvuhez (sl. *bioéthique*).

éthmoïdite ◇ **ethmoiditis** ◇ **silegfo** g. Tanijenn a 'r glaourgenn o c'holeiñ ar sileg pe a 'n askorn e unan.

- éthologie** ◇ **ethology** ◇ **1 realoniezh b. al loened, milrealoniezh b. 2 realoniezh denel, denrealoniezh** 1 Studi realezh al loened en o metoù naturel. 2 Studi realezh an den en e amved.
- éthylomètre** ◇ **ethylometer, breathalyzer** ◇ **etilventer g., analefenner g.** Ardivink da vuzuliañ feur an alkool etilek en aer ec'hanalet, o pourchas un teul moulet; resisoc'h eget an etilverker, ned eo ket hezoug.
- éthylotest** ◇ **alcohol test** ◇ **etilverker g.** Ardivink hezoug da ziournat an alkool etilek en aer ec'hanalet.
- étiologie** ◇ **(a)etiology** ◇ **1 arbennouriezh b. 2 arbenn g. -où, arbennelezh b.** 1 Diskiblezh o studiañ arbennoù ar c'hleñvedoù. 2 (Arveret peurliesañ elec'h Gl. *cause*) amveziad e raklen ur c'hleñved.
- étirement** ◇ **stretching** ◇ **1 deheadañ 2 dic'hronnañ** 1 Ster gouzañvat, sachañ war un ezel gant an dorn. 2 Ster oberiat, astenn an izili.
- étoile vasculaire, angiome stellaire, naevus araneus** ◇ **spider n(a)evus, stellar n(a)evus, vascular spider** ◇ **angiom g. steredenn, nevuz g. kevnidenn** Angiom kroc'hen, anezhañ ur pik ruz a vent gant ur penn spilhenn pe ur ferenn e kreiz ur bleñchennadur a gorrwazhied usvollek, talmek, sezet war an dremm, an divarvrec'h ha kein an daouarn.
- étrangé** : **sentiment d'~**, **impression d'~** ◇ **far-away feeling** ◇ **santad g. an dirgended, dirgenvan b.** Arvez an distreñniñ, anezhañ dec'havaelañ ar bed evel estren, espar, hep gwerc'hegezh, anglevet gant gouzviadad an neuroziou enkreiz, an droukfell ividig, pistriadurioù 'zo ha dreist holl ar skizofreniezh.
- étranglement** ◇ **stricture** ◇ **1 munvac'h g., munvac'hañ 2 tagelladur g., tagellañ** 1 (Mezekniezh lezennel) *Tagañ* er ster : pouezañ war c'harloc'henn un den evit herzel outañ a analañ. 2 Enstrizhañ un organ hag astaliñ amred ar gwad drezañ, darvoud o tec'han an un azonou pe dost forzh pehini e ve ar flugezenn tagellet : laurioù ferv, c'hweladoù, enkreiz, h.a.; e tro an avelenn tagellet e lavarer ivez *skoulmadur, skoulmañ*.
- étrier** ◇ **1 stapes 2 stirrup** ◇ **stleug g.** 1 Elfenn diabarshañ eus ristenn eskernigoù ar skouarn grenn harp ouzh prenestr ar rakkambr. 2 Elfenn eus un amsteudell a 'r c'har, framm metal e stumm un U, anezhañ un diaz ma pouez ar votez ha daou vann kenvellet gant an astell ouzh gar.
- étuve** ◇ **1 sweating 2 drying 3 sterilizing room 3 incubator** ◇ **1 stoufaih g. c'hwezlec'h g. 2 forn dishadennañ 3 tesaer g. -ioù** 1 Kambr gloz ma uhelaer ar gwrezverk evit dec'han ar c'hweziñ. 2 Ardivink ma sav ar gwrezverk dreist 100°C arveret da zishadennañ an dafar mezegel. 3 Ardivink ma talc'her ar gwrezverk d'an derez a zere ouzh tiñvadur ar garvevion.
- eucorticisme** ◇ **eucorticism** ◇ **kaenhevorc'hegezh b.** Stad kempouez ar bevedeg a-geñver gant borc'hañ reol ar gaenusloun-ezhenn.
- eugénie, eugénique, eugénisme, orthogénie** ◇ **eugenics** ◇ **heouennouriezh b.** Diskiblezh damkanel o plediñ gant amveziadoù gwellañ ar gouennañ denel; *heouennouriezh nac'hek* (Gl. *eugénique négative*) a reer eus an diskiblezh embregel amkanet da ziren feur ar gen ezreol bezant en ur boblañs.
- eunuchisme** ◇ **eunuchism** ◇ **tizogiez b., olganadegezh b.** Stad an hiniennoù eus an eil revelezh hag eben o tioueriñ ar borc'hañ ganadel adalek o bugeliezh, pe da heul ar spazhañ pe diwar ur c'hleñved (jotorell); anat ez a ar strafuilhoù goude oad ar gaezouregezh : savder bras, neuz vugelek, ezvezañs ar c'hent-hag an eilarouezioù revel.
- eunuque** ◇ **eunuch** ◇ **tizog g. -ed, olganadeg g. -eion** Hinienn o tioueriñ ar borc'hañ ganadel adalek he bugeliezh.
- eupareunie** ◇ **eupareunia** ◇ **heembar g.** Kefleuniadur greadoù revel bonan (sl. *dyspareunie*).
- eupepsie** ◇ **eupepsia** ◇ **hegoazh g.** Koazhañ reol.
- eupeptique** ◇ **eupeptic** ◇ **hegoazhus aa.** Oc'h aesaat d'ar c'hoaz-hañ.
- euphorie** ◇ **euphoria** ◇ **1 hevred g. 2 gourboz g.** 1 Tuedigezh vonan an noa d'ar boz anglevet muioc'h eget emouezet. 2 Reñver kleñvedel an hevred, naouus dre ar vroudedigezh, an anc'hrez, ar froudareizhañ, erzerc'had an usnoa a stader er psikoziou, el labanded, en envedi, en drammgaezhioù.
- eurythmie** ◇ **eurythmia** ◇ **hegorvez g.** Korvez (kalon, h.a.) reol.
- ethanasie** ◇ **ethanasia** ◇ **deandizh g., deandizhad g., deandizhañ** Abretaat dre araezioù mezegel marv ur c'hlañvoud dibare (sl. *dysthanasie*).
- euthymie** ◇ **euthymism** ◇ **henoa g.** Noa bonan, stad vred a zespizer dre an ezvezañs a zurc'hadurioù kleñvedel war-du ar gouvid pe ar vroudedigezh.
- euthyroïdie, euthyroïdisme, euthyréose** ◇ **euthyroidism** ◇ **skoedhevorc'h g., heskoedeg b.** Borc'hañ reol ar skoedenn; arveret e vez ivez an termen da arouezañ feur reol an hormonoù skoedennel, na pa ve ul lod anezho degaset ent vezegel.
- euthyscope** ◇ **euthyscope** ◇ **eutiskop g.** Seurtad oftalmoskop arveret da vezezañ ar bouc'hwel arc'hwelel.
- eutocie** ◇ **eutocia** ◇ **heeskor g.** Gwilioud reol.
- eutonie** ◇ **eutonia** ◇ **hedant g.** Tant reol.
- eutonologie** ◇ ◇ **arwastadouriezh b.** Studi an araezioù oc'h azderc'hel pe oc'h assav an arwastadez (sl. *équilibration, équilibre, homéostasie*).
- eutrophie** ◇ **eutrophia** ◇ **hedeñv g.** Mezbur ha diorreadur reol eus holl barzhioù ar bevedeg.

évacu-

• *bronche permettant l'évacuation du contenu nécrotique liquéfié d'un foyer infectieux* bronkezenn a c'hoarvez drezi karzhidigezh endalc'had marvennek liñvelaet un annon pore • *évacuation de la bile dans l'intestin* karzhadur ar vestl trema ar pervez • *évacuations fréquentes de glaires sanglantes* oulgarzhañ puilh a sklerennoù gwadek • *évacuer des calculs* karzhañ grouan • *ingestion d'un repas gras entraînant la contraction et l'évacuation de la vésicule biliaire* euvriñ ur pred lipidek war-benn lakaat ar gellenn vestl da argrezañ ha da skarzhañ he endalc'had • *les substances évacuées par le tube digestif* an danvezioù distaolet gant ar ganol vezhur • *tuyau placé dans un conduit afin de l'explorer, de l'évacuer ou d'y injecter un produit* korzenn a sanker en ur ganol d'he erc'hwiliañ, d'he c'harzhañ pe da ensinklañ enni un aozad.

évacuation ◇ **evagination** ◇ **ec'houinañ** Balirañ un organ e-maez eus e c'holoenn.

évalu-

• *évaluation de l'amplitude des mouvements articulaires à l'aide d'un goniomètre* dewerzhañ heled fiñvoù an arzoù diwar-bouez ur c'hornventer • *évaluation de la force* dewerzhañ an nerzh • *évaluer la responsabilité des accusés* andalañ kiriegezh ar gehuzidi • *évaluer la rétention des pigments dans les tissus* priziañ lendalc'h al livuzennoù e-barzh ar gwiadou • *évaluer le risque héréditaire* andalañ ar riskl hêrezhel • *les bases du sang évaluées en mmol/l* bazennoù ar gwad dwerzhet e mmol/l.

éveil : **réaction d'~** ◇ **arousal** ◇ **erwezh g. defraouiñ, defroù g.** Daskemm o tarvezout en empennvarrezañ a-geñver gant an defraouiñ (steuz ar gwagennoù gorrek hag ar gwerzhidoù naouus d'ar c'houkded).

éveinage, tringlage ◇ **stripping** ◇ **dioskañ** Araezad kurañ glovelloù an ezel traoñ arloet dreist holl ouzh ar wazhienn spis bras; ebarzhiañ a reer un drikenn en oaled ar wazhienn evit he distreiñ warni he unan, he digrakañ hag he sachañ er-maez.

éventail : **signe de l'~** ◇ **fan sign** ◇ **arouez b. an aveler** Diskalfañ ar bizied treid pa lakaer ledseizidi 'zo d'ober fiñvoù pebeilat astenn ha plegañ ar c'hef war al lestr.

éventration ◇ **eventration** ◇ **torogad g., toullgofad g.** Avelenn o tarvezout e parzhioù diaraok ha kostezel ar c'hof; kemm a lakaer etre an *torogadoù emdarzh*, diwar zivig ar speur (angwe, lec'h, seizi, kozhiadezh, gwilioudoù niverus), an *torogadoù daraazel* (da heul ur gouli pe ur gwezh surjaniel) ha *torogadoù ar gelc'hspeurenn* (dreistuheladur padek ur gouc'hell hep odead er gigen).

éversion ◇ **eversion** ◇ **ezriblad g., ezriblañ** Andell savet en dro d'un digor naturel diwar ogadur ar glaourgenn.

évision scolaire ◇ **exclusion from school** ◇ **handalc'h g. skolel, handerc'hel diouzh ar skol** Berzañ ar skol ouzh ur bugel klañv ha tredizhus e-doug ur prantad savelet war-benn heporiñ an treled.

évidement pétromastoïdien ◇ **petromastoidectomy** ◇ **enbenañ karregenn-brennigenn** Digeriñ surjaniel ar c'havennoù mougev-askev ha taboulin ha dazbidañ speur askorn krec'h-adreñv ode diavaez ar c'hleved, oberatadenn a ranker ober evit dizarbenn ar rouestladoù enkloupenel diwar skouarnfoioù henek 'zo.

évidence

• *mise en évidence d'anticorps spécifiques* dinoiñ antikorfoù spesadel • *mettre le déficit en évidence* lakaat an divigad war wel • *pigment naturel utilisé pour mettre en évidence le glycogène* livegenn naturel danvezet da naouaat ar glikogen • *séquelle sans évidence d'activité* arlenad hep anad niñ gantañ.

éviscération, exentération ◇ **evisceration** ◇ **1 eztorañ 2 disvoulc'had g., disvoulc'hañ 3 ezpodañ** 1 Tennañ bloc'had ar bouzelloù e-maez kavenn ar c'hof dre ur flañchadenn etre al lech hag ar c'haezour, gwezh surjaniel a reer war glask d'un anaf pervez. 2 Ezvoned eus flugez ar c'hof da heul diskrafadur ur gouli oberatael. 3 Eztennañ endalc'had ar pod lagad pe boull al lagad hepken.

évitement : **réaction d'~** ◇ **shunning reaction** ◇ **erwezh g. gavaelgaz** Mizigon e dalc'h un anaf en dolbezenn gitem, anezhañ moned diarzoug an dorn hebiou d'an draezenn m'en astenner tremazi evit he c'hemer; a rumm emañ gant an *erwezh gavaelgar* (sl. *grasping-reflex*).

évolutif ◇ **1 evolutive 2 evolutionary** ◇ **1 dedroat aa., dedroadel aa. 2 ~emdreïñ, emdroat aa., emdroadel aa.** 1 A-zivout un anaep pe un anaf war zaskemm ha peurliesañ war c'hrevusaat, sk. : *remm dedroat*. 2 A-zave d'an emdreïñ (sl. *dysharmonie évolutive*).

NOTENN : Br. *emdreïñ* ha deveradoù a sell ouzh dibun an diorren reol, Br. *dedreiñ*, hollekoc'h, a sell ouzh an dibun eus argerzhioù diseurt, kleñvedel pergen.

évolution ◇ **evolution** ◇ **1 emdroadur g., emdreïñ 2 dedro g., dedroadur g., dedreiñ** 1 Diorren un organ, ur bev pe un hil bevion; *emdroadur unandarzhel* pe *unandarzh* (Gl. *évolution ontogénétique, ontogenèse* pe *ontogénie*) a reer eus diorren an hiniennoù; *emdroadur hildarzhel* pe *hildarzh* (Gl. *évolution phylogénétique, phylogenèse* pe *phylogénie*) a reer eus diorren ar spesadoù; *emdroadur gouskoev* pe *gouskoevad a 'n emdreïñ* eo diorreadur un organ, ur gwriad o forc'hañ diouzh ar goulev reol (oc'h ec'houleviañ) hag o tisoc'h gant neuziadoù pe lec'hiadoù ezreol. 2 *Dedroadur ur c'hleñved* a reer eus dibun ar pazennoù anezhañ.

évolutionnisme biologique, transformisme ◇ **biological evolutionism, transformism** ◇ **emdroadouriezh b. vevedel, treuzfurmadoriezh b.** Doazhadur o tisplegañ diwanadur ar spesadoù bev dre drezufurmatur war gempleshaat adalek ar furmoù eeunañ; ar *festedouriezh* (Gl. *fixisme*) eo an doazhadur kevenep, o haeriñ ez eo chomet digemm ar spesadoù bevion adreuz d'an amzer.

évolu-

• *affection d'évolution bénigne* anaez kuñv e zedro • *caractères macroscopiques, histologiques et évolutifs* naouusterioù meursell-adel, gwiadurel ha dedroadel • *cycle évolutif des vers parasites* emdrogor ar preñved arvevat • *du point de vue évolutif, tumeurs d'accroissement lent, sans métastases* ent dedroadel, yoc'hennoù o kreskiñ gorrek hep teurel dassezioù • *follicules évolutifs* bolc'h emdroat • *les quantités de chaleur évoluant dans un espace clos* ar gwrezadoù en arloc'h en un ec'honenn gloz • *séquelles que l'on considère comme non évolutives et non susceptibles d'amélioration* arlenadoù a seller evel andedro hag angwellaus • *tissu conjonctif évoluant pour donner le cartilage hyalin* gwriad kenglenel oc'h emdreñ etrezek ar migorn gwerek.

exacerbation ◇ **exacerbation** ◇ **grizezadur g., grizezañ** Muiadur trumm ha padennek eus erzerc'hadoù ur c'hleñved, eus al laur hag an azonoù poanuis pergen.

exalt-

• *exaltation de la virulence d'un germe pathogène* derc'haviñ anialegezh un hadenn gleñvedus.

examen de corps ◇ **external examination** ◇ **imbourc'h gorre, kelanarselliñ** Ensellout ha deskrievañ anafoù diavaez ur c'helan, arglask disheñvel diouzh ar c'helanweliñ dre an ezvezañs a skejañ.

exanthème ◇ **exanthem** ◇ **eksantem g.** Ruzder kroc'hen, hep krugenn na c'hwezignenn, a stader en un niver bras a gleñvedoù.

excavation papillaire ◇ **excavation of optik disk** ◇ **enloezad g. ar vegenn weledel** Pukadenn gleñvedel begenn an nervenn weled, erzerc'had ar glaokom peurliesañ.

expicent ◇ **expicent** ◇ **ambrougenn b.** Danvezenn diwered drezi he unan a vesker gant ul lia evit aesaat an danzen hag an diounit anezhañ.

excision ◇ **excision** ◇ **1 gouvenañ 2 amnaziñ** 1 Skejañ ha dilemel un darn vihan eus un organ, sk. : *an amdroc'hañ*, gouvenañ a 'r veskenn. 2 Troc'hañ kuit eus ur gouli ar gwiadoù kreuet, marvennet pe saotret evit lezel gwiadoù bonan hepken.

excitabilité ◇ **excitability** ◇ **broudadusted b.** A-zivout un elfenn vev, en araez da vezañ broudet.

excitation ◇ **excitation** ◇ **1 broudañ 2 broudad g. 3 broud g. 4 fraouaat 5 broudedigezh b.** 1 Genel ar broud, eleze delankañ un erwez e par ur gellig, ur gwriad, un organ pe ar bevedeg, ha pa ve endeuat pe ezdeuat ar ganer. 2 Taol broudañ. 3 Stad vroudañ. 4 Arloañ ur gwered en araez da vroudañ (arveret e vez a wechoù Gl. *exciter* evel kenster da *stimuler*). 5 Usniñv an arc'hwelioù bred naouus dre an anc'hez komz ha meidiñ o vont betek ar c'hefroù.

excit-

• *excitabilité myocardique* broudadusted ar c'haher kalon • *foyer d'excitation* annon broud • *hyperexcitabilité musculaire* usvroudadusted kaherel • *le baryum 137m se désexcitant en émettant un rayonnement γ* ar bariom 137m o tiargridañ dre ec'hodiñ ur skinad γ • *le nucléide Y est créé dans un état excité* ganet e vez an nukleid Y er stad argrid • *propagation de l'onde d'excitation* treled ar wagenn vroudañ.

exclusion ◇ **exclusion** ◇ **ezkaelañ** Ezvevennañ un darn eus ar ganol vezhur diouzh treug danvezioù ar c'hoaz-hañ, sk. : *ezkaelañ ar porzhier* (Gl. *exclusion du pylore*).

excoriation ◇ **excoriation** ◇ **klisiadenn b., klisiañ** Kignadenn a-c'horre (sl. *abrasion, érosion*).

excrémentiel ◇ **excrementitious** ◇ **1 oulennec aa. 2 oulennel aa.** 1 A natur gant an oulennoù. 2 A-zave d'an oulennoù.

1 excréments, excreta 2 excréments, egesta, fèces, matières fécales, selles ◇ **1 excréments, excreta 2 excréments, egesta, f(a)eces, stools** ◇ **1 diouladoù l. (g.), disveveladoù l. (g.), ekskreta l. 2 oulennoù l. (b.), egesta l., kaoc'h g., kac'hadoù l. (g.), mon g.** 1 Anvad rumm oc'h arouezñ kement danvezenn ezvevennet gant ar bevedeg, dilerc'hiadoù ar c'hoaz-hañ pe ar c'hennevidoù (kaoc'h, troazh, c'hwez, bestl, h.a.). 2 Kement danvezenn distaolet ent reol gant ar ganol vezhur (sl. *egesta*).

excrétion ◇ **excretion** ◇ **1 dioulañ 2 degorzhañ** 1 (Ster hollek) ezvevennañ an disveveladoù. 2 (Ster resis, arveretoc'h) deheñtañ ar borc'hadennoù er-maez eus an organ, ar wagrenn pergen, en deus o danzeet, peurliesañ diwar-bouez ur *ganol degorzhañ* (Gl. *canal excréteur*); arveret e vez a-wechoù Gl. *excrétions* evel kenster da *excreta*.

excrét-

• *anurie excrétoire* troazhandegorz, gaouantroazh • *capacité maximale d'excrétion tubulaire* barr degorzhañ tuellennel • *excrétion accrue d'un groupe d'acides aminés* muiadur dioulañ ur stroll amindrenkennoù • *excrétion et élimination des médicaments* degorzhadur hag ezvevennadur al liaoù • *la fonction excrétrice du foie* arc'hwel dioulañ an avu • *présence de microbes dans l'urine lors de l'excrétion* bezañs garvevion en troazh da ampoent an dioulañ • *voies excrétrices* forzhioù degorzhañ.

excroissance

• *chondrophyte* : *excroissance cartilagineuse intra-articulaire* amdeñvenn migorn, migormdeñvenn : tagos migorn e-barzh ur c'henvell • *excroissances osseuses et cartilagineuses* amdeñvennoù askorn ha migorn • *petite excroissance en saillie sur la peau* tagos bihan o valirañ diouzh ar c'hroc'hen.

exerc-

• *cabinet de consultation où exercent plusieurs praticiens associés* kuzulva ma vez o pleustriñ lies embregour kevredet • *discipline exercée en même temps que la médecine générale* diskiblezh embreget war un dro gant ar vezekniezh hollek • *exercer la biologie médicale dans un laboratoire* embreger ar vevoniezh vezegel en un arnodva • *exercer la médecine* pleustriñ ar vezekniezh • *exercer*

un pouvoir tampon skurzñ • *exercice d'assouplissement ou de rééducation* embreg oueskaat pe addiorren • *l'exercice de la médecine* pleustr ar vezekniezh, embregerezh ar vezekniezh • *force qui s'exerce à la surface d'un liquide* nerzh o werediñ e gorre ul liñvenn • *muscle qui exerce l'action principale* kigenn o ren ar gwered pennañ • *réaliser un exercice déterminé* kas da benn un embregad lavaret.

exérèse ◇ **exerESIS**, **excision** ◇ **dilemel**, **ezvenañ**, **gouvenañ**, **amnaziñ** Tennañ surjaniel un organ, ur yoc'henn, ur c'horf estren er-maez eus ar bevedeg.

exfoliation ◇ **1 2 exfoliation 3 peeling** ◇ **1 2 dispeliañ 3 peliat** 1 Ezvevennañ parzhioù marvennet (eskern, stirenoù) e rezh lavnigoù. 2 Ezvevennañ gweleadoù gorre ar c'hroc'hen (sl. *cheilite exfoliatrice, desquamation collodionnée du nouveau-né*). 3 Arloañ war ar c'hroc'hen aozadoù gourc'henneiat (prederiadur an akne).

exhémie, **exsiccose** ◇ **exsiccosis**, **plasma lost** ◇ **isvec'h g. plasma**, **ezwad g.** Leiadur ec'honad ar gwad amredat, displeget, hervez an aozerion, dre azdalc'h ur c'hementad dour er gwiadoù pe dre ur fuadur dour e-maez ar c'horrwazhied aet rehedrez.

exhibitionnisme ◇ **exhibitionism** ◇ **diskorataerezh g., diskorata** Darlusk da ziskouez an organoù genel, o tizhout ar baotred dreist holl; azoniad deskrivet evel lodek e kleñvedoù diseurt, psikoz, neuroz, troziadezh, labanded, envedi.

exocol, **museau de tanche** ◇ **vaginal part (of uterus)** ◇ **ezgouzoug g., min g. tañch** Rann a-c'houin gouzoug ar grozh (sl. *cervicite*).

exocrine ◇ **exocrine** ◇ **1 ezvorc'hat aa., ~ezvorc'hañ 2 ezvorc'hadel aa.** 1 A-zivout ur wagrenn o tilaoskiñ he dedaolad e par an amwiskadoù pe e par ur glaourgenn. 2 A-zave d'an ezvorc'hañ (sl. *endocrine*).

exocrinopathie ◇ **exocrinopathy** ◇ **ezvorc'hanaez g.** Klañvadur ar gwagrennoù ezvorc'hañ.

exocytose ◇ **exocytosis** ◇ **eksokitoz g.** Ezvountañ eus ar gellig greunigoù gronnet gant ur goc'henn, houmañ o chom skarvet gant koc'henn ar gellig (sl. *endocytose, phagocytose*).

exodontie ◇ **exodontics** ◇ **digewanouriezh b.** Kalvezouriezh an tennañ dent.

exogamie ◇ **exogamy** ◇ **ezpriedelezh b., ezpriediñ** Unaniñ daou zen ankenwad.

exogène ◇ **exogenic** ◇ **ezdeuat aa.** O tont a-vaez ar bevedeg (sl. *endogène*).

exognathie ◇ **exognathia** ◇ **avenusled g.** Reledanded un pe an div aven (*karvanusled, kavedusled*) (sl. *allélognathie, brachygnathie, endognathie*).

exomphale, **exomphalocèle** ◇ **exomphalos** ◇ **begelod g.** Avelenn vege.

exonération ◇ **exoneration** ◇ **oulgarzhañ** Diskarg bouzelloù.

exophorie ◇ **exophoria** ◇ **ezwilt'hañ** Ankensteud ezwar enkelat, eleze na anataer nemet dre un ardivink o lakaat ageñver bukadurioù an daou lagad (sl. *ésophorie*).

exophtalmie ◇ **exophtalmia** ◇ **raklagadegezh b.** Baliradur pe raktourzhadur eus boull al lagad e-maez ar pod.

exorbitis, **exorbitisme** ◇ **exorbitism** ◇ **rakpodadegezh b.** Raktourzhadur eus endalc'had a-bezh ar pod lagad.

exosome ◇ **exosmosis** ◇ **eztreleizhiñ** Red treleizhiñ oc'h etzeiñ dre ur gennenn handrez diouzh un trevnad kloz (ur gellig, da skouer) isgrennek e endalc'had e-keñver an amva (sl. *endosome, osmotique : pression ~*).

exostose ◇ **exostosis** ◇ **ec'haskornenn b.** Yoc'henn guñv, gwiad askornel ouzh he ober, kresket o valirañ diouzh gorre un askorn.

exotoxine ◇ **exotoxin** ◇ **eksotoksin g.** Toksin furmet pe e diabarzh ar bakteri (Gram+ pe -), pe en diavaez anezho dre wered un enzim borc'het ganto hag o skignañ en amva (sl. *endotoxine*).

exotropie ◇ **exotropia** ◇ **ezwariañ** Ankensteud ezwar diskelat, loarkrerezh ezwar (sl. *endotropie*).

exovirus ◇ **exovirus** ◇ **eksovirus g. -où** Retroviruz a zo dindan 10 % an unrezhded etre e c'henom ha genom ar gellig dibore, ostiz naturel dezhañ (sl. *endovirus, rétrovirus*).

expansif ◇ **expansive** ◇ **emledus** A-zivout ur yoc'henn, a zo war gresk he ec'honad.

expectant ◇ **expectant** ◇ **1 diarc'hed aa., diarc'hedus aa., ~diarc'hediñ 2 diarc'heder g. -ion** 1 O tremen gant arsellñ, hep gwezhañ. 2 Mezeg tuet da ziarc'hediñ.

expectorant ◇ **expectorant** ◇ **1 kraostus aa. 2 kraostuzenn b.** 1 Oc'h aesaat ar c'hraostañ. 2 Lia kraostus.

1 3 expectoration 2 4 expectoration, crachat ◇ **1 3 expectoration 2 4 sputum** ◇ **1 kraostañ 2 skopañ, skrouediañ 3 kraostad g. 4 skopad g., skrouediad g.** 1 Disteurel dre basaat an danveziou reol pe gleñvedel bezant er forzhioù analañ. 2 Disteurel dre ar genoù danveziou o tont eus ar forzhioù analañ, kraost, gwad, h.a. 3 An danvez kraostet, ar c'hraost distaollet dre basaat. 4 An danvez skrouediad (sl. *crachat*).

expert médical, médecin expert ◇ **medical expert** ◇ **mezeg kevarouez, kevarouezour g. -ion mezegel** Mezeg ezholet pe dibabet evit reiñ ur meno kalvezel e sell da skarat un arguz a-zivout ur c'hleñved pe un darvoud.

expertise médicale ◇ **medical appraisal** ◇ **kevarouezañ mezegel** Imbourc'hiñ kalvezel goulennet ouzh ur mezeg kevarouez gant ur barner, un amaezhierzh pe, en ur stern prevez, gant ur c'hevredad kretaat.

expertise médicolégale ◇ **medicolegal examination** ◇ **kevarouezañ lezennvezegel** Imbourc'hiñ (kelanweliñ, h.a.) gou-lennet ouzh ur mezeg gant ur barner evit pourchas ditour d'al lez varn eus natur hag amveziadoù ar gloazadoù hag an anafoù stadet war reuzied ur c'houl, ur felladenn pe un darvoud.

expiration ◇ **expiration** ◇ **ec'hanelañ** Eil lankad an analañ, anezhañ kas an aer e-maez ar skevent.

expiration forcée ◇ **forced expiration** ◇ **ec'hanelañ helc'het** Karzhañ aer eus ar skevent en tu all da vevenn an ec'hanelañ reol; an ec'honad helc'het, e-tro 1,2 l, a reer anezhañ an *ec'honad mir ec'hanelañ* (Gl. *volume de réserve expiratoire*); etre 10,2 l ha 10,5 l eo ec'honad an aer o chom er skevent e dibenn un ec'honalad helc'het (*ec'honad dilerc'h*, Gl. *volume résiduel*) (sl. *volume expiratoire maximum seconde*).

explant ◇ **explant** ◇ **erdiñv** g. Darn vihan organ pe gwriad erlamet e sell d'ober un diñvadenn anezhi.

explor-

- *appliquer l'oreille sur la région à explorer* arloañ ar skouarn ouzh ar parzh da erc'hwiliañ • *bougie exploratrice* still erc'hwiliañ
- *exploration clinique* imbours'h klinikel • *exploration non effractive des voies biliaires à l'aide de l'imagerie par résonance magnétique* erc'hwiliañ ar forzhioù bestl diwar-bouez ar skeudennerezh dre zasson gwarellel • *explorer la capacité des centres hypothalamiques à déclencher la sécrétion des gonadostimulines* erc'hwiliañ gouested kreizennoù ar gouzerc'hvel da elloiñ borc'hadur ar gonadostimulineier • *l'étendue du spectre à explorer* lec'hed ar skalfad da imbours'hiñ • *tube destiné à être introduit dans un canal pour l'explorer* korzenn a sanker en ur ganol d'he erc'hwiliañ.

explos-

- *explosion soudaine de manifestations psychotiques* nodadur trumm erzerc'hadoù psikoz • *fabrique d'explosifs* oberierezh vloskuzennoù.

expos-

- *exposé à la contagion* en arvar un tredizhad • *exposé à la lumière de haute montagne* en ardizh gouloù an uhelvenez • *pneumopathie consécutive à l'inhalation d'antigènes organiques en rapport avec l'exposition aux poussières de chanvre* skeventad diwar zewentañ antigenoù bevel ageñver gant ardizh an uzor kouarc'h • *se trouver davantage exposé* mont e brasoc'h ardizh • *Sujets plus exposés à devenir diabétiques* gouzrec'hioù tebekoc'h an diabet ganto • *traumatisme exposé, c'est-à-dire avec ouverture des téguments* daraez igor, eleze gant troc'hadur an amwiskadoù.

expression génique ◇ **gene expression** ◇ **erzerc'haat ar gen, erzerc'haat genennel, generzerc'haat** 1 An anadiñ er fenotip eus an doareenn a-zalc'h ouzh ur c'henenn. 2 Kreñvder an erzerc'haat genennel, andalet a-geñver gant feur ar protein enaozet dindan wered ur c'henenn.

expressivité ◇ **expressivity** ◇ **erzerc'hausted b.** Argemmusted kreñvder an erzerc'haat genennel; dre araez ar c'hrugoù DNA e vuzulier feur enaozañ ar protein; koublet gant an *erzerc'hausted* e saveler ur braster andennadel all, ar *werc'hennusted*, anezhi aliested erzerc'haat un doareenn hêrezhel en ur familh (sl. *pénétrance*).

exsanguination ◇ **exsanguination** ◇ **diwata** Lemel an holl wad eus ur gouziviad, gwezh kevredet gant un treuzskuilhañ bloc'hel.

exsanguino-transfusion ◇ **exchange transfusion** ◇ **erlec'hwata** Amsaviñ gwad ur gouziviad, dewerc'het dre un treuzskuilhañ bloc'hel (o tîraez 2 pe 3 gwech an ec'honad gwad hollel) kevredet gant lemel ur c'hementad gwad kevatal; hentenn ergemennet e tro kleñvedoù gwad (eritroblastoz an nevezc'hanidi, leukemiezh lemm) ha pistriadiurioù 'zo (lounezhfo lemm gant antroazh).

exsorption, entérosorption ◇ **exsorption** ◇ **ezsugañ** Ezteñ danvezzennoù eus ar gwad trema oaled ar pervez.

extrophie, extroversion ◇ **extrophy** ◇ **disgweread** g. Kammneuziad un organ liennnek a zo a-wel ar glaourgenn anezhañ, sk.: *disgweread ar c'hwezbigell*, anezhañ balirad glaourgenn ar c'hwezbigell er c'hougrezenn e dianlen ezvezañs he speur arak ha speur arak ar c'hof.

exsudat ◇ **exudate** ◇ **naouezenn** Liñvenn vededel gwech levrus, gwech fibrinek pe glaourek, o tourasenniñ diouzh ur gorre foek.

exsudation ◇ **exudation** ◇ **naouezañ, naouezadur** g. Dourasenniñ ul liñvenn vededel.

exsud-

- *alvéolite exsudative* logigfo naouezennus • *entéropathie exsudative* perveznaoued naouezennus • *liquide qui exsude du caillot* dourenn o strilhañ diouzh ar gaouledenn.

exsufflation ◇ **exsufflation** ◇ **ezc'hwezhañ** Lemel aezhenn eus ur gavenn, sk.: *ezc'hwezhañ ur bruskaezhad*.

extemporané ◇ **extemporaneous** ◇ **arbed** aa. A-zivout ur gwezh renet a-benn kaer, evel aozañ an angevezh apotikel pe un imbours'h gwriadoniel e-kerz un oberatadenn.

1 extenseur **2 extenseur, exerciseur** ◇ **1 extensor** **2 exerciser** ◇ **1 astenner** aa. **2 skarader** g. **-ioù** 1 A-zivout ur gignep pe ur stirenn o perzhiañ en astenn ur rann ezel. 2 Prest kaherekaat, eleze ardivink embreget evit gourdonañ ar c'higennoù, ouzh e ober div zornell a ranker kenskarat dre strivañ ouzh ar gwinterelloù stignet etrezo.

extension ◇ **extension** ◇ **astenn** Muiaat ar c'horn luniet gant div rann eus un ezel.

extension continue ◇ **continuous extension** ◇ **astenn diastal** Hentenn diren an torrou dre ziloc'hekaat an ezel torret hag e zerc'hel er gourfaouez e-barzh ur framm skourrañ diwar-bouez un nerzh sachañ o werediñ dre hanterezh berioù treuzaskorn.

extensité ◇ **extensivity** ◇ **erdal g.** Perzh an traezoù merzhet da gaout stummoù ha loadur en egor, a-gevenep d'an *ental* a zo perzh an traezoù da bourchas eraezadoù d'ar stekiñ hervez o c'hantalc'h (sl. *amorphognosie, ahylognosie, intensité*).

extens-

- *action fibrosante extensive* gwered fibreseiat aloubus • *amorphognosie, agnosie d'extensité* andenaoud ar stummoù, andenaoud a-erdal • *compartiment ostéoponevrotique inextensible* tirenn askornliens-tirennek andastenn • *contracture en extension* dargrezad war astenn • *contre-extension* enebastenn • *en hyperextension* dreistastennet • *étrier de traction-extension* stleug sach-astenn
- *extension (d'un terme, logique)* erdal • *extension (d'une maladie par contagion)* tredizhañ • *extension active* astenn oberiat
- *extension continue* astenn diastal • *extension du gros orteil* astennidigezh ar meud troad • *extensité (neurologie)* erdal • *fibrose intersti-tielle extensive* fibroz entremezel aloubus • *hyperextension* dreistastennadur.

extériorisation ◇ ◇ **trec'havaelañ** Arc'hwel nervvredel, anezhañ merzhout an ergorennoù loet en tu-hont da zibenn an nervennoù santout (gwelout n'eo ket dec'havaelañ al luc'hsae met an traoù); ur furm ezreol a drec'havaelañ eo merzhout un *ezel tasmant*, anadenn anvet c'hoazh *kammzerc'h an ambideion*.

extériorisation ◇ **exteriorization** ◇ **ezkavennañ** Tennañ ur flugezenn er-maez eus ar gavenn m'emañ ent reol.

externa, adventice ◇ **tunica adventitia, externa** ◇ **ezsae b., eksterna b.** Sae diavaez ar gwazhied, o c'hoarvezout a wiad kenglenel stalet an darn vuiañ eus e elfennoù a-stur gant ahel ar wazhiedenn.

externe des hôpitaux ◇ ◇ **diavaeziad g. -ed a 'n ospitalioù** (Termen bet en arver en ospitalioù Frañs) Studier war ar vezekniezh anvet dre genstrivadeg, na oa ket lojet en ospital; ober a rae war-dro ar glañvourion dindan atebegzh an diabarzhad; freuzet e voe ar genstrivadeg e 1969 hag anv a reer hiziv a *studier ospitaliel* (Gl. *étudiant hospitalier*) (sl. *interne*).

extérocepteur ◇ **exteroceptor** ◇ **gorrefraouva g.** Dibenn an nervennoù santout frauaet gant kentrigennoù o tont a-vaez ar bevedeg.

extinction sensitive ◇ **extinction** ◇ **difeuziñ an eraeziñ, difeuz g. an eraeziñ** Astal merzhidigezh ur gentrigenn groc'heneh pa zouger war un dro ganti ur gentrigenn all en ur poent all a-gendu pe a-eiltu eus ar c'horf; strafuilh lodek en azoniadoù kiternel.

extirpation ◇ **extirpation** ◇ **amzivenañ** Dilemel un dra (yoc'henn, h.a.) en e bezh.

extorsion ◇ **extorsion** ◇ **ezrodañ** Fiñv ul lagad en dro d'e c'hwelahel a-saezh o tilec'hiañ lodenn grec'h ar voull war-du an diavaez (sl. *intorsion*).

extra-utérin : grossesse ~e ◇ **extrauterine pregnancy** ◇ **bec'hiegi ezkrozhel** Diorreadur ar vi speriet e-maez kavenn ar grozh (korzenn, ampelell).

extracardiaque ◇ **extracardial** ◇ **avaezkalon** Na zeu ket eus ar galon, sk. : *sourr avaezkalon*.

extracorporel ◇ **extracorporeal** ◇ **ezkorfel aa.** E-maez egorenn ar c'horf (sl. *circulation extracorporelle*).

extraction ◇ **extraction** ◇ **1 eztennañ 2 douhenniñ 3 digewanañ** 1 (Ster hollek) lemel un dra eus al lec'h m'emañ dalc'het; (Gwiliouderezh) lemel kalvezadel ar grouell eus ar grozh, pe gant an daouarn, pe diwar-bouez binvioù (loaioù, mandozioù, h.a.), pe dre ur gwezh surjaniel (kezarian). 2 (Bevgimiezh) tennañ un danvezenn eus ur metoù dre araez un dileizher aezhidik pe get. 3 (Surjianerezh) diframmañ un dant eus e logig (sl. *avulsion*), ur bolod eus ar c'horf.

extract-, extrait

- *action extractive de l'alcool* gwered douhenniñ an alkool, douhennusted an alkool • *alcaloïde extrait des feuilles d'une plante sud-américaine* alkaloid douhennet eus delioù ur plant suamerikat • *coefficient d'extraction* gwezhiader douhenniñ • *extraction et préparation industrielle des médicaments* douhenniñ ha danzen greantel ar gwezherioù mezegañ • *extraire des corps étrangers des voies respiratoires* eztennañ korfoù estren eus ar forzhioù anañ • *extraire le fœtus mort par les voies naturelles* eztennañ ar grouell varv dre ar forzhioù natur • *extraire les calculs du cholédoque* eztennañ ar grouan eus ar san vestl • *extraits d'aloès* douhennadoù aloez • *l'extraction du cristallin* ezvenadur ar ferenn.

extrapéritonisation ◇ **extraperitonealization** ◇ **ec'hampelennañ** Ezkaelañ un organ anafek eus kavenn an ampelell.

extrapyramidal : syndrome ~ ◇ **extrapyramidal syndrome** ◇ **azoniad ampikernennek** Teskad strafuilhoù diwar darallad ar stirad ampikernennek : direizhoù an tant kaherel, ec'houleviañ ar fiñvoù andiarvenn ha diarzoug; lies furm dezhañ : azoniad parkinsonek, korea, atetoz, kleñved Wilson, hemiballegezh, midantoù, h.a.

extrapyramidal : tractus ou système, système sous-cortical ◇ **extrapyramidal tract or system** ◇ **stirad g. pe reizhiad b. ampikernennek** Trevnad ar gronnoù louet loc'hañ hag ar gwiennoù degasat hag ezkasat loet er rannbarzhioù endan-bluskenn hag endan-derc'hvel, lakaet er-maez ar stiradoù pikernennek hag ilpennel.

extrasystole ◇ **premature beat, extrasystole** ◇ **dreistsistol g. -où** Argrezad rakkoulz a 'r galon a orin ezlec'hiat, heuliet gant ur paouez hiroc'h eget ar paouez reol, ar paouez kevassav (sl. *repos compensateur*).

extraversion ◇ **extraversion** ◇ **eztroadur g.** Termen luniet gant Jung evit arouezañ trec'hded stagadur al libido ouzh an ergerc'hennoù diavaez (sl. *introversion*).

extra-

- *cholestase extrahépatique* bestlanred ec'havuel • *dans l'espace extracorporel* emaez egorenn ar c'horf • *extrapéricardique* e-

maez amgalonenn • *extravasation san-guine hypodermique* ec'hwazhiad gwad goudonennel • *pneumothorax extrapleurale* bruskaezhad e-maez krezoù • *substance extracellulaire* danvezenn ezkelligel.

extrême, extrém-

• *extrémité articulaire* penn kenvellañ • *extrémités céphalique et pelvienne* eizhaennoù krec'h ha traoñ • *les extrémités d'un os fracturé* daou benn un askorn torret • *maigreur extrême* treeted eizhañ • *refroidissement des extrémités* yenaat an eizhaennoù.

extubation ◇ **extubation** ◇ **ezpibañ** Lemel ar gorzenn bet sanket en ur ganol naturel (sl. *intubation*).

exubérant

• *formation exubérante au fond d'une plaie* furmadur paoterus e deun ur gouli.

exulcération

• *exulcération, érosion* graspad, graspiñ.

F

fabella ◇ **fabella** ◇ **favennig** b. Sezameg loet er glin, a-dreñv skodennoù an askorn morzhed.

fabric-, fabriqu-

- *les lymphocytes B*, lieu de fabrication des anticorps al limfokit B, lec'h parañ an antikorfoù
- *trialcool*, sous-produit de la fabrication du savon trialkool, adken-derc'had diwar oberierezh ar soavon.

fabulation ◇ **confabulation**, **fabrication**, **fabulation** ◇ **1 imbroudeñ** **2 imbroudeñ** b. 1 Dec'hmegeñ darvoudoù hag o danevellañ evel gwerc'hel. 2 Danevell darvoudoù dec'hmeget ha lakaet da werc'hel.

1 3 face **2 face**, **figure** ◇ **face** ◇ **1 fas** g. **2 dremm** b. **3 talbenn** g., **tal** g. 1 Rannbarzh araok ar penn. 2 Lodenn draoù ar fas, loet dindan an divabrant. 3 Gorre ur parzh korf, un organ (sl. *front*).

facial : **nerf** ~ ◇ **facial nerve** ◇ **nervenn** b. **an dremm** Seizhvet re nervennoù a-glopenn, nervenn loc'hañ kigennoù kroc'hen an dremm hag ar gouzoug.

faciès, **facies** ◇ **facies**, **face** ◇ **enebrezh** g. Arvez an dremm, azonus e kleñvedoù 'zo.

faciès aortique ◇ **aortic facies** ◇ **enebrezh aortek** Gwelved an dremm, bouilhadoù ruzder a stader er skorted aortek.

faciès grippé, **faciès péritonéal** ◇ **facies abdominalis** ◇ **enebrezh ampeleñnek** Distresadur an dremmvez e-kerz an ampeleñnek lemm strewek pe da geñver ul laur kriz (kolonfo, divilhennfo) : glazez an nead, baliregezh tresoù an dremm, disked ha drekadur an daoulagad, sell enkrezet.

faciès souffleté de Trousseau ◇ ◇ **enebrezh stlafadet** Arvez dibarek an dremm e-kerz dispuilhad ar skarlegenn, naouus gant roudennoù ruz, etrezo roudennoù gwenn.

fac-

- *branche temporofaciale du nerf facial* barroù gen-boc'h nervenn an dremm
- *face latérale du veru montanum* tal kostezel turumell ar sper
- *faciès figé* fas sonnet
- *la face antérieure du tronc* talbenn araok ar c'hef
- *la face occlusale de la dent* talbenn keharzel an dant
- *les deux faces de la membrane* daou dal ar gennenn
- *les faces opposées de la paroi interne de la cavité* talioù kevenep speur diabarzh ar gavenn
- *paralyse faciale* seizi an dremm
- *présentation de la face* erload ar rakpenn, erload an dremm
- *saillie de la face interne du duodénum* tosenñ war speur diabarzh an daouzegenn.

facilitation ◇ **facilitation**, **enhancement** ◇ **1 arloezañ** **2 herouezañ** 1 Izelaat gwehin ar broud ret da zelankañ un damoug gant an alies ma vez arloet ar broud. 2 Kreñvaat ur bevfiñvad diwar-bouez unan all, pleustr korvoet e hentennoù addiorren evit dec'han kevelfiñvoù.

facilitation immunitaire ou **immunologique** ◇ **immunological enhancement** ◇ **herouezañ hangaeel** Gwarezadur un antigen gant un antikorff spesadel, anadenn diac'hinek o tiwall ent hanbarek ar gwiad m'emañ an antigen diouzh an antikorfoù amkanet d'e naouaat ha d'e zispenn; argerzh korvoet evit gwarediñ ar gwiad pe an organ imboudet diouzh an erwezhoù difenn a-berzh bevedeg ar roadour; aesaat a ra da diñvadur an imboudenn dre ober lenañ ouzh kelligoù houmañ antikorfoù diglok (*antikorfoù herouezus*, paret gant al limfokit B) o werediñ evel antikorfoù tolc'hus na zedennont ket ar glokaenn ha, dre se, a warez ar c'helligoù ouzh gwazhusted al limfokit T.

facilit-

- *anticorps facilitant* antikorff herouezus
- *l'activité de la boucle gamma est d'entre-tenir un état de facilitation des motoneurones alfa* gwerederez ar wedenn gamma eo trezerc'hel herouezusted er motoneuron alfa.

facteur ◇ **factor** ◇ **pareñn** b., **gwereder** g. -ioù Elfenn o tasperzhiañ e delankañ pe e dedreñ un erwezh, un anaez, un anadenn.

NOTENN : Bras eo niver an termennoù a zo Gl. *facteur* o ger kentañ. Un darn vras anezho a gaver er geriadur dindan enmouedoù un anvad all : **facteur I** (sl. *fibrinogène*), **facteur II** (sl. *prothrombine*), **facteur II a** (sl. *thrombine*), **facteur III** (sl. *thromboplastine*), **facteur IV** (anvad roet d'ar c'halkiom evel elfenn ret da gaoulediñ ar gwad), **facteur V** (sl. *accélérine*), **facteur V Leiden** (sl. *protéine C*), **facteur VI** (sl. *accélérine*), **facteur VII**, **proconvertine** (sl. *convertine*), **facteur VII bis** (sl. *facteur Stuart*), **facteur VIII** (sl. *thromboplastinogène*), **facteur IX** (sl. *facteur antihémophilique B*), **facteur X** (sl. *facteur Stuart*), **facteur Xa** (sl. *anti-Xa*), **facteur Xg^a** (sl. *groupes sanguins*), **facteur XII** (sl. *facteur Hageman*),

facteur antihémophilique A (sl. *thromboplastinogène*), **facteur C** (sl. 1° *plasma thromboplastin antecedent*, 2° *Rhésus : facteur* ~), **facteur C₂** (sl. *citrine*), **facteur Cellano** (sl. *groupes sanguins*), **facteur Christmas** (sl. *facteur antihémophilique B*), **facteur clarifiant** (sl. *lipoprotéine-lipase*), **facteur cytotoxique** (sl. *lymphotoxine*), **facteur d'activation des lymphocytes** (sl. *interleukines*), **facteur de Durand-Reynals** (sl. *diffusion : facteurs de* ~), **facteur E** (sl. *Rhésus : facteur* ~), **facteur FF** (sl. *pantothénique : acide* ~), **facteur P** (sl. *citrine*), **facteur thymidine** (sl. *somatoméline*), **facteurs D** (sl. 1° *Rhésus : facteur* ~, 2° *complément*).

facteur d'activation des plaquettes, pa-f-acéther ◇ **platelet activating factor** ◇ **parenn vlivaat ar pladanoù** Fosfolipid dilaosket gant ar bazofil hag ar mastokit, unan eus hanteradoù an dreistkizidigezh kentizhek, parenn greñv kenan dazadur ar pladanoù, araezus d'ar bronkezstrishaat, d'an iswask talmerel ha d'ar gouliñvoù.

facteur antihémophilique B, facteur IX, facteur Christmas ◇ **plasma thromboplastin factor B (PTFB), beta prothromboplastin** ◇ **parenn antihemofilek B, beta protromboplastin, parenn IX** Globulin bezant, anniñvek, er plasma hag er gwadveiz; enniñvet e vez e diastok gorreannoù estren d'ar reizhiad wadgwazhiedl reel ha, gant an tromboplastinogen, ez a da furniñ an tromboplastin; arbenn an hemofiliezh B eo an diouer anezhañ.

facteur B ◇ **factor B** ◇ **parenn B** Betaglobulin bezant er gwadveiz, o tasperzhiañ e blivaat ar glokaenn dre an hent dazeilat (sl. *complément*).

facteur de croissance (dérivé) des plaquettes sanguines ◇ **platelet derived growth factor** ◇ **parenn greskiñ pladanaat** Protein endalc'het e-barzh greunanoù ar pladanoù; pa vez dilaosket e plasma ar gwad ez aesa da gaouediñ ar gwad hag e kevaraez ar c'hleizennañ dre vuanaat emrannerezh ar c'helligoù; an un protein eo a ve kiriek da neridigezh ar c'helligoù kankrek.

facteur déclenchant la sécrétion d'hormone mélanotrope, MSH-RF ◇ **melanocyte stimulating hormone releasing factor, MSH-RF** ◇ **elloerenn b. vorc'hañ an hormon melanotropek, MSH-RF** Hormon polipeptidek gouzerc'hvelat o fraouaat borc'hadur an hormon melanotropek gant ar rakgougorfenn.

facteur déclenchant la sécrétion de l'hormone somatotrope, GRF, somatocrine ◇ **growth releasing factor, GRF** ◇ **elloerenn vorc'hañ an hormon somatotropek, elloerenn greskiñ, GRF** Hormon polipeptidek gouzerc'hvelat oc'h enteiñ er c'horgorfenn dre ar founilh hag o fraouaat borc'hadur ar somathormon; nes e ve dre e zelun d'ar prostaglandineier E.

facteur déclenchant la sécrétion de prolactine, PRF ◇ **prolactin releasing factor, PRF** ◇ **elloerenn vorc'hañ ar prolaktin** Polipeptid gouzerc'hvelat oc'h enteiñ er c'horgorfenn dre ar founilh hag o fraouaat borc'hadur ar prolaktin.

facteur déclenchant la sécrétion de thyroestimuline, thyrolobérine, TRF ◇ **thyrotropin releasing factor or hormon, TRF** ◇ **elloerenn vorc'hañ an tireostimulin, TRF** Danvezenn bolipeptidek (tripeptid) danzeet e parzh araoak ar gouzerc'hvel, o tremen dre ar founilh betek ar rakgougorfenn hag o fraouaat borc'hadur an hormon skoedwezher.

facteur digitalique ou digitalomimétique endogène ◇ **digitalis-like compound** ◇ **parenn digitalinvanek endeuat** Danvezenn a chom dindan gevarguz he natur kimiek ha lec'h he orin er bevedeg, dec'hanus d'un troazhusvorc'h natriom dre heudañ an dassugañ tuellenel; gwerediñ a rafe dre dolc'hañ ar porzher natriom evel ma ra an digitalin, eleze dre heudañ un enzym proteek loet e-barzh kennenn ar gellig, an ATPaz Na⁺K⁺.

facteur F ◇ **Fagent** ◇ **parenn F** Plasmid o treuzkas d'ur bakteri an naouuster hilel "gourev" pe "roer" (sl. *épisode, plasmide*).

facteur Hageman, facteur XII ◇ **Hageman factor** ◇ **parenn Hageman** Unan eus ar proteinoù plasmatek kaolediñ anvet parennoù diastok, nes d'ar barenn C; en diouer anezhi e vez hiraet pad ar c'haouediñ hep direizh all en aoz ar gwad nag er stad klinikel (sl. *facteurs de contact*).

facteur inhibant la sécrétion d'hormone mélanotrope, MSH-IF ◇ **melanocyte stimulating hormone-inhibiting factor, MSH-IF** ◇ **heuderenn vorc'hañ an hormon melanotropek, MSH-IF** Hormon polipeptidek gouzerc'hvelat o skoilhañ ouzh borc'hadur an hormon melanotropek gant ar rakgougorfenn.

facteur inhibant la sécrétion de prolactine, PIF, PIH ◇ **prolactin inhibiting factor, prolactin inhibiting hormon, PIF, PIH** ◇ **heuderenn vorc'hañ ar prolaktin, PIF, PIH** Polipeptid danzeet gant ar gouzerc'hvel, o tiskenn dre ar founilh betek ar rakgougorfenn hag o skoilhañ ouzh borc'hadur ar prolaktin.

facteur inhibant la synthèse de l'ADN ◇ **inhibitor of DNA synthesis, IDS** ◇ **heuderenn enaoz an DNA, IDS** Unan eus hanteradoù dourennel an hangae kelligel, borc'het gant al limfokit toazonampegat, o skoilhañ ouzh paradur an DNA hag ouzh neridigezh nep kellig, neoazh hep hualañ azvedigezh al limfokit.

facteur inhibiteur de la migration (des leucocytes et des macrophages) ◇ **migration inhibitory factor, MIF** ◇ **parenn heuder emdizh (al leukokit hag ar makrofag), MIF** Parenn wrezstabil, unan eus hanteradoù dourennel hezileizh an hangae kelligel, borc'het gant al limfokit toazonampegat; dilaosket e vez gant al leukokit a-ziastok an antigen ez int kizidikaet outañ (tennad kentañ, spesadel); en un eil tennad, anspesadel, e wered war ar c'helligoù douger pe get d'ar kez antigen, o tazgludañ ar c'helligoù unkraoñellek engwazhiedl ha tregenkat.

facteur mitogène ou mitogénique ◇ **mitogenic factor** ◇ **parenn vitoseiat** Unan eus hanteradoù dourennel hezileizh an hangae kelligel, borc'het gant al limfokit toazonampegat; devoudañ a ra emrannidigezh al limfokit aziastok an antigen spesadel.

facteur natriurétique auriculaire ou atrial ◇ **atriopeptin, ANF** ◇ **parenn natriomdroasheiat kentezel, ANF** Danvezenn bolipeptidek borc'het gant kelligoù ar c'henteziou, ganti perzhioù natriomdroasheiat, troazhusvorc'hus, gwazhiedfrankaus.

facteur de perméabilité ◇ **lymph node permeability factor** ◇ **parenn hedreuzded** Unan eus hanteradoù dourennel hezeleizh an hangae kelligel, borc'het gant al limfokit toazonamlegat; gwerediñ a ra war hedreuzded ar c'horrwazhied ha kevaraezañ tremen al leukokit hag ar plasma trema an esaou ezwazhiedel.

facteur R ◇ **R factor** ◇ **parenn R** Plasmid en araez da dreuzkas eus ur bakteri d'unan all an harzusted ouzh ar bevastalerioù, an *harzusted plasmidel* (Gl. *résistance plasmidique*).

facteur rhumatoïde ◇ **rheumatoid factor** ◇ **parenn rumatoïdel** Euglobulin ezreol a dolz mol uhel, eus rummenn an immunoglobulin IgM, bezant e-barzh plasma gwad an darn vuiañ eus gouziviaded al liesarzfo rumatoïdel, anezhañ un ananantikorf o tazgwerediñ ouzh gammaglobulineier (IgG) ar gouziviad e unan.

facteur de risque d'une maladie ◇ **risk factor** ◇ **parenn riskl (ur c'hleñved)** Elfenn o vuiaat darvezusted ur c'hleñved : boazioù bevañ, kleñved all, amveziadoù ha naouusterioù diseurt, da skouer evit an ateroskleroz : ar butun, ar c'hourevezh, an diabet c'hwek); diforc'h eo ar barenn riskl diouzh arbenn ar c'hleñved.

facteur Stuart, facteur VII bis, facteur X ◇ **Stuart factor** ◇ **parenn Stuart** Elfenn o tasperzhiañ e kaoulediñ ar gwad, o vuanaat treuzfurmatur ar protrombin e trombin; nes eo d'ar prokonvertin.

facteur de transfert ◇ **transfer factor** ◇ **parenn dreuzdoug** Parenn dialzadus spesadel d'an hangae kelligel, borc'het gant al limfokit toazonamlegat kizidikaet ouzh un antigen; emañ en araez da dreuzdougen memor hangaeel an kez limfokit kizidikaet ouzh un antigen (hag outañ hepken) trema limfokit ankizidikaet ar gouziviad ouzhañ ha trema limfokit ur gouziviad all.

facteurs de coagulation ◇ **coagulation factors** ◇ **parennoù kaoulediñ** Elfennoù o tasperzhiañ e kaoulediñ ar gwad, proteinoù plasmatek an darn vuiañ anezho; arouezet int bet gant ur c'hengor etrevroadel a 'n destladur dre un heuliad sifroù roman eus I da XIII; dre ar lostrann a ez arouezer ar *furmou blivaet* anezho, piaouer da berzhioù treluskañ pe da gedparennoù, sl. : *parenn Xa* (sl. *cofacteur*).

facteurs de contact ◇ **contact factors** ◇ **parennoù diastok** Proteinoù o tasperzhiañ e kaoulediñ ar gwad, bezant er gwad en ur furm anniñvek; enniñvet e vezont dindan 5 min war-dost a-ziastok ur c'horreenn hec'hle estren d'ar metoù gwadgwazhiedel reol (sl. *facteur antihémophili-que B, facteur Hageman*).

facteurs de croissance ◇ **growth factors** ◇ **parennoù kreskiñ** Danvezennoù polipeptidek na anavezur ket mat evit c'hoazh, diforc'h diouzh ar somatomedineier ha hep keñver eeun gant an hormon somatotropek; lenañ a reont ouzh ar buzerioù kennennel ha fraouaat an neridigezh kelligel; hennadet ez eus bet un niver anezho (sl. *cytokine, somatomédine*).

facteurs de déclenchement, facteurs de libération ◇ **releasing factors or hormones, RF, RH** ◇ **parennoù elloiñ, elloerennoù** l.(b.) Danvezennoù polipeptidek paret gant ar gouzerc'hvel, o fraouaat borc'hadur an hormonoù gant ar c'horgorfenn.

facteurs (pro)thromboplastiques ◇ **(pro)thromboplastic factors** ◇ **parennoù (pro)tromboplastek** Anvad rumm elfennoù parañ an tromboplastin, unan dilaosket gant ar pladanoù, an tromboplastinogenaz, ar re all o tont eus ar plasma, ar furmoù plasmatek A ha B a zo o ezvezañs e devoud div furm an hemofiliezh.

facteur

• *dépister les facteurs nuisibles* diurnat ar parennoù noazus • *en l'absence de tout facteur microbien* en ezvezañs nep parenn c'harvevel • *facteur déterminant dans le "choix de la névrose"* gwereder tonkus evit "debarzh an neuroz" • *facteur étiolo-gique* parenn arbennel • *facteur extrinsèque* parenn ezien • *facteurs humoraux et cellulaires* parennoù dourennel ha kelligel • *facteur intrinsèque* parenn enien • *facteur lipotrope* parenn vehingerc'h • *facteurs exogènes et endogènes* parennoù ezdeuat hag endeuat • *facteurs morphogénétiques* parennoù neuztarzhel • *le déclenchement du signal d'angoisse n'est pas nécessairement subordonné à des facteurs économiques* delank an enkreuz arhent ned eo ket dre ret izurzhiat da werederioù armerzhel • *pluralité de facteurs* liesparennegezh.

factice ◇ **facticious** ◇ **manat aa., erwereat aa.** Drevezat, kalvezadek, derc'heilat, derc'haozat; sk. : *azonoù erwereat*, *azonoù touellus erzerc'het ent emouez pe get* (sl. *hystérie, pathomimie, simulation*).

factoriel ◇ **factorial** ◇ **parennel** A-zave d'ur barenn pe d'ar parennoù.

facultatif

• *anaérobie strict, facultatif* anaerat ret, anret • *anthrophile strict, facultatif* dengerc'h strizh, amstrizh.

fading mental, barrage à minima ◇ **fading** ◇ **fatad g.** Furm leiek a gaelad : war c'horrekaat ez a niñvañ (prezeg ha fiñvoù) ar c'hlañavour evel pa vije sorbet gant prederioù all, azon a skizofreniezh.

Fahr : **maladie de ~** ◇ **Fahr's disease** ◇ **kleñved Fahr** Anaez naouus *ent neuziadurel* dre goc'hionadoù halioù kalkiom daoudu ebarzh gronnoù louet a-greiz an empenn ha gronnoù dentek an ilpenn, hewel war skinlunioù an empenn; *ent klinikel* dre erzerc'hadouñ navel (droukfell, tizhadur ar forzhioù pikernennek, azoniad parkinsonek, azoniad ilpennel), darallad an neuzid, a-wechoù arouezioù skorted arskoedennel; marvus eo dindan un nebeut bloavezhioù goude un dedro argreskus; dianav eo an arbennoù.

faim douloureuse ◇ **hunger pain** ◇ **naon laurus** Laur en argreuzenn o tarvezout pa vez goullou ar stomok ha pa zihun an naon; distanet e vez dezhañ gant an euvriñ boued; erzerc'had eo eus angreizh an daouzegenn.

faisceau ◇ **bundle** ◇ **hordenn b.** 1 Stroll gwiennoù (navel, h.a.) dezho un treug boutin. 2 Lanvad rannigoù (luc'h, h.a.).

Fallot : **tétralogie ou tétrade de ~** ◇ **tetralogy of Fallot** ◇ **pevaradezh b. Fallot** Kammneuziad kalon naouus *ent neuziadurel* dre gevreted isvoll kef ar skevent, dehouloadur gwask an aortenn, ur c'hehentad etre-kofigoù uhel hag usteñv ar c'hofig

dehou, anezhi seurtad paotañ an dulazioù ganedigel (an daoufarzh eus an degouezhioù); *ent klinikel* dre daolenn ar c'hleñved glas (sl. *bleue* : *maladie* ~); kevreizh da c'hrevusted ar gammneuziad eo arhoali ar glañvourion : etre un nebeut mizioù ha 50 vloaz, etre 5 ha 15 vloaz ent keitat, ar marv o tarvezout dre anoksiezh; oberatadus eo pe dre zasforzhañ aortenn ha kef a 'r skevent, pe dre beurzazluniañ.

Fallot : *trilogie* ou *triade de* ~ ◇ **trilogy of Fallot** ◇ **triadezh b. Fallot** Kammneuziad kalon naouus *ent neuziadurel* dre strishadur gwask ar c'hef askevent, bonanded an dilhenn etre-kofigoù ha ur c'hehented etre-kentezoù; *ent klinikel* dre an trec'hwezh, an dulaz a-wechoù, usteñv ha, da heul, skorted ar c'hofig dehou; anaez pareadus dre ar surjianerezh dindan skoevredad (trapigenbenañ a-skevent, serrañ ar c'hehented etre-kentezoù).

famille ◇ **family** ◇ **kerentiad g.** Derez rummañ ar bevion, rummad (Gl. *taxon*) loet etre an urzhad (Gl. *ordre*) hag an iskerentiad (Gl. *sous-famille*) (sl. *biotaxie*, *biotype*, *domaine*).

famil-

• *affection familiale* anaez familhel • *antécédents familiaux* diagentoù familhel • *centre de placement familial* kreizenn endredañ adfamilhel • *famille des halogènes* kerentiad an halogenoù • *famille des Trombididés* kerentiad an Trombidideged • *hypokaliémie chronique familiale* kaliomwadisvec'h henek familhel • *langage familier* kaozeeg • *planification familiale, contrôle des naissances* steuñviñ ar genel, reoliñ ar genel.

Fanconi : *anémie* ou *maladie de* ~ ◇ **Fanconi's disease, congenital aplastic anaemia** ◇ **amwad pe kleñved Fanconi, amwad angweel ganedigel** Amwad angweel helivel familhel, treuzkaset er mod enkilek aotzomek, gant un olgwenn muiek, un olgranulokit dreist holl, hag un olpladanoù, e dianlen angwe ganedigel ar mel eskern; oc'h erzerc'hañ e-tro an oad a 6 vloaz kevret gant direizhoù liesseurt : livegad kroc'hen, dilerc'h kreskiñ, angwe eskern an dorn (meud berr pe ezvezant), a-wechoù kammneuziadoù kalon, lounezh pe lagad, kaezougezh dilerc'hek; darvezout a ra ar marv a-raok an oad a 20 vloaz dre boread, gwadliñv pe leukemiezh lemm.

fango ◇ **fango** ◇ **fango g.** Fank volkanel danvezet er yac'hadouriezh.

fangothérapie ◇ **fangothérapie** ◇ **fangogurañ** Danveziñ ar fankoù volkanel evel dic'hoster e rezh kouronkoù, amlenadoù, palastroù.

fantasme, phantasme ◇ **fantasy, phantasy** ◇ **eriuell b.** (Bredelfennerezh) senario dec'hmegat, ar gouzrec'h o kaout roll ennañ, o tezerc'hañ leuniadur ur c'hoant diemouez.

FAPA ◇ **FAPA** ◇ **FAPA** Gwreskanv diwar an anvadoù saoznek : *Fever, Adenopathies, Pharyngitis, Aphtous somatitis*, kevreted barroù terzhienn, afitoz a 'r genoù, gargadennfo ha c'hwarnnoù, taolenn glinikel a stader gant ar bugel bras.

Farabeuf : *signe de* ~ ◇ **Farabeuf's sign** ◇ **arouez b. Farabeuf** Arouez eus enankañ an erload, hemañ o virout ouzh an daou viz ebarzhet dre ar gouin a ziraaz talbenn araok an askorn kroazell.

farad ◇ **farad** ◇ **farad g.** Unanenn etrevroadel an dougogi (Gl. *capacité électrostatique*), arouez F, atalad mentawouriel $U^{-1}IT$, dougogi un dougell warni bec'hiad ur c'houlomb evit tredanvarr ur volt.

faradique : *courant* ~ ◇ **faradic current** ◇ **red g. faradek** Gwagenn reizhkorn ur red berrbad pe tredanskog reizhkorn o kevredañ div bazenn reizhkorn a-c'hin.

faradisation ◇ **faradization** ◇ **faradegañ** Danveziñ yac'hadel pe arnodel an tredanedoù pebeilat ankendalc'hek dewerc'het dre zereadur.

Farber : *maladie de* ~, *lipogranulomatose disséminée* ◇ **Farber's disease** ◇ **kleñved Farber, lipogranulomatoz g. strewek** Kleñved hêrezhel dibaot diwar ur strafuilh e kennevid ar c'helligoù mezenkimatus, naouus *ent neuziadurel* dre anafou granulomatus war ar c'harloc'henn, an trapig mintrek, al levgennoù, ar stagelloù, ar stirennoù, an derm hag ar reizhiad nervel; *ent klinikel* ez erzerc'h ar c'hleñved gant ar magadelled dre ur mouezhvibar, ur stridor, direizhoù koazhadel, gouliñv an eizhaennoù, ozvennoù kroc'hen, un dilerc'h bredloc'hadel hag ar marv war verr dermen.

farcin ◇ **farcy** ◇ **farsilh g.** Anvad lakaet war erzerc'hadoù kroc'hen ar morm (sl. *morve*).

fascia ◇ **fascia** ◇ **faskienn b.** Lienenn stirek gwevn o c'holeiñ ar c'higennoù pe o tispertiañ ar rannbarzhioù korfadurel.

fascia cribriformis ◇ **cribriform fascia, A fascia cribrosa** ◇ **faskienn groueriek** Lodenn diabarzh feilhenn vas lientstirenn ar vorzhed e par tric'hogn ar vorzhed.

fascia lata ◇ **fascia lata** ◇ **faskienn ledan** Lavnnenn stirek tev, parzh diavaez eus lientstirenn ar vorzhed, stalet etre kribenn ar glun en nec'h ha skodenn gostezel ar skin en traoñ, enlenet outi kigenn stenner ar faskienn ledan en araok, gwiennnoù a-c'horre kigenn vrasañ ar peñs en adreñv.

NOTENN : Dav eo merkañ an daskemm degaset d'an *Nomina anatomica* (NA pe PNA, 1983) gant an *Terminologia anatomica* (TA, 1997) : houmañ diwezhañ ne ra mui *fascia* eus al lienenn stirek endan-groc'hen. A du 'rall, ne glot ket an holl dermenoù en arver e galleg o teraouiñ dre *fascia* gant termenoù an destladurioù etrevroadel PNA pe TA, sk. : Gl. *fascia périrénal, fascia rénal* PNA & TA *capsula fibrosa (ren) pourc'had stirek (al lounezh)*; Gl. *fascia recto-vaginal* PNA & TA *septum rectovaginale tilhenn youlc'h-gouin*, h.a.

fasciculation ◇ **fasciculation** ◇ **duilhenngrehad g.** Argrezadoù andiarvenn gant ur stroll gwiennnoù lodek en un hordenn gaher, hep loc'hañ, hewel hepken e gorre ar c'hroc'hen, anadenn o c'hoarvezout gant ar skuizhvez pe, peurliesañ, e dianlen un tizhad a 'r motoneuron.

fascicule ◇ **fascicle** ◇ **duilhenn** b. Stroll gwiennoù nerverl, kaherel, kenglenel lodek en un hordenn.

fasciculé ◇ **fasciculated** ◇ **hordennaouek** aa. Stalet e rezh hordennoù, sk. : *yoec'henn hordennaouek*, enni hordennoù paot a wiennoù kenglenel.

fascicul-

• *bloc de branche mono-, bi-, tri-, plurifasciculaire* tolc'had barr un-, daou-, tri-, liesstirad • *bloc fasciculaire* : *nom générique des blocs siègeant sur un ou plusieurs fascicules (branche, rameau, rameau secondaire) du faisceau de His* tolc'had stirad : anvad rumm an tolc'hadoù o sezañ war un pe lies stirad (barr, rannvarr, isrannvarr) eus an hordenn gantez-kofig.

fasciite ◇ **fasciitis** ◇ **faskiennfo** g. Tanijenn ur faskienn, sk. : *faskiennfo strewek gant eleozinofil* (Gl. *fasciite diffuse avec éosinophilie*).

fasciite nécrosante, érysipèle nécrotique, gangrène dermique aiguë, cellulite fulminante ◇ **necrotizing fasciitis** ◇ **goudonennfo marvennus, tangouez** g. **marvennus, goudonennfo rurek** Poread ar c'houdonenn (anvet gwechall *faskienn eudan-groc'hen*, Gl. *fascia hypodermique*), peurliesañ diwar ur c'hevredad strepokok-anaeraded, o tec'han ur varvenn gant gouliñvoù o tedeññ afo hag o tisoc'h e plakadoù bras gwadliñvus ha gloevennek hag en ur bleuz a c'hell bezañ marvus.

Fasciola hepatica, Distoma hepaticum, Distoma hepaticum, grande douve ◇ **Fasciola hepatica, Distoma hepaticum, sheep liver fluke, common liver fluke** ◇ **Fasciola hepatica, Distoma hepaticum, distomenn** u. **vras an avu** Lenkermenn eus urzhad an Trematod a gaver e forzhioù bestl an deñved, a-wechoù en avu an den (sl. *distomes*).

fasciolase, fascioloze ◇ **fasciolosis** ◇ **faskiolaz** g. Distomatoz an avu a zo e vezher *Fasciola hepatica* (sl. *distomatose*).

fatigue ◇ **fatigue** ◇ **skuizhnez** b. Stad o tisoc'h eus ur strivañ kreudel pe vredel bras ha/pe hir o tec'han ur merzhad divluz hollek pe lec'hiek andespizadus evel pep emanglevad, un digresk eus efedusted an obererezh hag un izeladur eus an eniñv (asikted); gant paouez ar strivañ e steuz ar skuizhnez reol, dre ar gourdonerezh e taleer ampoent he donedigezh; pa na steuz ket gant ar paouez pe pa zarvez da heul strivadoù bihan (skuizhadusted reñverek) e komzer eus skuizhnez ezreol, bezant e taolenn glinikel ur c'hleñved (sl. *adynamie, asthénie, épuisement, fracture de fatigue, neurasthénie, psychasthénie, sthénie*).

fatigue chronique, maladies des yuppies ◇ **chronic fatigue syndrome** ◇ **azoniad ar skuizhnez henek** Azoniad deskrivet en USA, o kevredañ un asikted vras andispleget hag o padout c'hwec'h mizvezh da nebeutañ, un derzhiennig, ur c'hwarrenn, arzadoù; an arbenn, kevarguzet, e ve ar viruz EB, gant pe hep mononukleoz poreel, pe viruzoù all (kitomegaloviruz, herpétoviruz).

faune

• *faune des cadavres* mileg ar c'helanoù.

fausse route ◇ **false passage** ◇ **hent gaou** 1 Darvoud kateteriñ, ar sont o toullañ speur ar ganol hag o sankañ e gwiadoù an ardro. 2 Dewentadur euvradoù pe c'hweladoù.

faux du cerveau ◇ **faux cerebri** ◇ **falc'h** b. **an empenn** Azledad a-zerc'h ha kreizer diwar ar bilhonenn dev, enlenet en arakouzh ar glipenn gilhog, en adreñv ouzh lodenn greizer telt an ilpenn, oc'h amparañ ur wareg dreist ar c'horf karnek hag ur speur etre div hanterenn an empenn.

faux du cervelet ◇ **faux cerebelli** ◇ **falc'h an ilpenn** Azledad a-zerc'h ha kreizer diwar ar bilhonenn dev, enlenet dre e ribl krec'h ouzh telt an ilpenn, oc'h amparañ ur speur etre div hanterenn an ilpenn.

Favaloro : **opération de ~** ◇ **Favaloro's operation, coronary by-pass** ◇ **oberatadenn Favaloro, heptreug** g. **kurunerel** Pontadur aortenn-kurunerenn, gwezh amkanet da assav lanvad ar gwad en un dalmerenn guruner en ardrañ d'un isvroll pe d'ur steviadur.

faveur, favor-

• *appareil favorisant un mouvement passif au moyen d'un mouvement actif* ardivink o kevarezañ ur fiñv gouzañvat diwar-bouez ur fiñv oberiat • *évolution défavorable* dedroadur arwashaus • *favorisant l'évolution de la grossesse* emsavus da emdroadur ar vec'hiegi • *favorisant par sa contraction l'expulsion du produit de sécrétion* o kendaoliñ dre argrezañ da argas ar vorc'hadenn • *favoriser le chimiotactisme des polynucléaires* gwezhusaat kimidrevnegezh ar granulokit • *infections favorisées par l'immunodépression ou infections opportunistes* poreadoù a-gevareez d'an ishangae pe poreadoù koulzataer • *la position de dégagement la plus favorable* an durc'hadur ec'hankañ gweliek • *la position la plus favorable à l'écoulement des sécrétions* al lakadur araezusañ da ziverañ ar borc'hadennoù • *la présentation la plus favorable à l'accouchement* an erload aesañ d'ar gwilioud.

faveux ◇ **favosus** ◇ **favozel** aa. A-zave d'ar favuz, sk. tagn favozel (Gl. *teigne faveuse*), favuz ar brigenn.

favisme, fabisme ◇ **favism** ◇ **favegezh** b. Anaez naouus dre un ikter gwadloezus, amwad, troazhalbuminegezh, asikted, direizhoù koazhadel ha terzhienn; darvezout a ra diwar dewentañ pollen pe euvriñ frouezh ar *Vicia faba* gant gouziviaded a vank dezho enzimou 'zo en o hemati; da rouestlad dezhañ a-wechoù ur skorted lounezh marvus.

favus ◇ **favus** ◇ **favuz** g. Dermatiz arvevadell tredizhus, o sezañ er brigenn dreist holl, naouus dre ar vezañs eus gobigoù goloet gant trouskennoù azvelen ma kouezh ar blev; devoudet gant ur foue (*Trichophyton schönleinii*), e tizh ar vugale hag ar grennardet dreist holl ha lezel un diwaoutad diwezhel war e lerc'h.

fébricule ◇ **febricula** ◇ **terzhiennig** b. Terzhienn leiek.

fébrifuge ◇ **febrifuge** ◇ **diderzhiennus** aa., **diwresterus** aa. **diderzhienner** g. -ioù, **diwresterer** g. -ioù 1 O lemel an derzhienn. Lia o lemel an derzhienn (sl. *antipyretique, apyrotogène*).

- fébrile** ◇ febrile, pyretic ◇ **1** terzhiennek aa., gwresterek aa. **2** terzhiennel aa., gwresterel aa. 1 Gant terzhienn. 2 A-zave d'an derzhienn (sl. *fièvre*).
- fécal** ◇ faecal, fecal ◇ **1** oulennek aa., kaoc'hek aa., monek aa. **2** oulennel aa., kaoc'hel aa., monel aa. 1 A natur an oulennoù. 2 A-zave d'an oulennoù (sl. *coproculture, coprolalie, coprolithe, coprologie, copromanie, coprophagie, coprophilie, coprostase, excrémental, excréments*).
- fécalogramme** ◇ fecalogram ◇ oulennrestrañ, oulennrestrad g. Elfennañ doareadel ha kementadel an oulennoù (tolz, kenaoz kimiek) (sl. *coprologie*).
- fécaloïde** ◇ faecaloid ◇ oulennvanek aa. Gant neuz ha c'hwezh an oulennoù, sk. *c'hweladoù oulennvanek*, anezho danvezioù liv gell teñval ha c'hwezh ar c'haoc'h a stader en antreizh pervez arbadet.
- fécalome** ◇ faecaloma ◇ oulendoñv g. Hogennad bras oulennoù oc'h enderc'hel d'un deznaouiñ digemmat diouzh ur yoc'henn bervez.
- fécalurie** ◇ faecaluria ◇ troazhoulennegezh b. Dezioulañ troazh ha kaoc'h mesket, e dianlen ur fic'h pervez-c'hwezhigell.
- fèces** ◇ stool, faeces ◇ mon g., oulennoù l. (b.), kaoc'h g. Danvezioù distaolet ent reol gant ar ganol vezhur (sl. *excréments*).
- Fechner : loi de ~** ◇ **Fechner's law** ◇ "saveleñ" **Fechner** "argemmañ a ra ar santad evel logaritm ar broudad", erganad nad eo ket ur saveleñ, met ur stadadenn o lakaat e penn kont ar c'heñver etre ur c'hreñver fizikel, braster astennadel muzuliadus, hag ur c'hreñver bredvedel, braster andennadel.
- fécondabilité** ◇ fecundability ◇ frouezhigadusted b. Tebegezh an engehentañ e-kerz ar c'hor miziaouel.
- fécondance** ◇ fecundancy ◇ frouezhigusted Barr frouezhigiñ ar sper.
- fécondation** ◇ fecundation ◇ frouezhigiñ Uniañ ur gamet gourev (spergellig) hag ur gamet benev (vigellig) ha furniñ ur vi (sl. *conception*).
- fécondation in vitro (FIV), fécondation in vitro et transfert d'embryon (fivete)** ◇ **in vitro fertilization (IVF), in vitro fertilization and embryo transfer (IVFET)** ◇ **frouezhigiñ in vitro (FIV), frouezhigiñ in vitro ha treuzdoug rizhell (FIVTR)** Hentenn brederiañ gaonac'hderioù benevel 'zo (korzennel peurliesañ), anezhi gorren gametoù gourev ha benev en imboure'hva, o lakaat a-gendiraez ha treuzplantañ ar rizhell e-barzh krozh ar c'houziviadez.
- féminisant** ◇ feminizing ◇ benevekaus aa. O lakaat anadiñ eilarouezioù benevel gant ur gourev.
- féminisation** ◇ feminization ◇ benevekaat Anadiñ eilarouezioù benevel gant ur gourev; benevegezh o tedreiñ goude ur prantad dic'houvevekaat, stadet e dianlen ar spazhadur, ar skorted klidennel, ur yoc'henn venevekaus a 'r glidenn (korioepiteliom), ur c'hortikosurrenalom pe an diounit estrogenoù.
- féminisme** ◇ feminism ◇ benevegezh b. Arvez hiniennoù 'zo manet andiorreet o c'hlidennoù, warno eilarouezioù benevel : kresk an divvromn, ezvezañs ar barv, ledanaat an divlezh, finded ar c'hroc'hen hag ar blev.
- femme de référence** ◇ **reference woman** ◇ **benev b. -ed dave** (Mezhuroniezh) Benev derc'hek, oadet a 25 bloaz, yac'h, 164 cm savder, 55 kg tolz, o vevañ en un hinad kerreizh, o ren un oberiezh reol, a zo he ezhomm gremm 9,6 kJ bemdez (sl. *homme de référence*).
- fémoral** ◇ femoral ◇ **1** ~askorn vorzhed **2** morzhedel aa. 1 A-zave d'an askorn morzhed. 2 A-zave d'ar vorzhed.
- fémoro-patellaire : syndrome ~, syndrome rotulien** ◇ **patellofemoral syndrome** ◇ **azoniad padelleg-morzhed, azoniad ar padelleg** Kevreted laurioù e talbenn araok ar glin da geñver pignat pe diskenn gant an diri, azezañ pe gluchañ pell amzer, pe pa bouezer war ar padelleg; gaougoubouladoù; dibaotoc'h, eskerbadoù, arzfoeñv, amheloc'h ar padelleg; darvezout a ra an azoniad da heul disvelladoù pe gouzissvelladoù adfeilhus, pe e dianlen anafoù dic'henezhadel a orin daraezel pe miweel.
- femto-** ◇ femto- ◇ femto- Rakger (daneg : *femten* "pempzek") o talvout 10^{-15} (da arouez ar rakrann f).
- fenestration, tympano-labyrinthopexie** ◇ **fenestration** ◇ **lomberañ** Oberatadenn, dilezet hiziv, evit parraat ouzh an anklav diwar osteospongios, anezhi digeriñ war ar ganol hantergelc'hiek diavaez ul lombar a imboudet warnañ d'e c'holeiñ un tamm kroc'hen moan a-gendalc'h gant lienenn an daboulin (sl. *cophochirurgie*).
- fenêtre ovale** ◇ **fenestra vestibuli** ◇ **prenestr g. ar rakkamb** Digor hirvoan diadrez e speur diabarzh kavenn an daboulin.
- fenêtre ronde** ◇ **fenestra cochleae** ◇ **prenestr ar velc'houedenn** Digor kelc'hiek e speur diabarzh kavenn an daboulin lec'hiet a-us da brenestr ar rakkamb.
- fenêtre thérapeutique, pause thérapeutique** ◇ **paouez g. yac'hadel** Spanaenn badennek a reer en ur prederiadur e sell da wiriañ ha strafilhoù a stader zo amweredoù diwarnañ pe, goude stadañ e ziefedusted, war-benn deraouiñ ur prederiadur all.
- fenêtre : signe de la ~** ◇ **aortic window** ◇ **arouez b. ar prenestr, prenestr aortek** Lijorenn sklaer a-dreñv an aortenn a-sevel ha dindan forc'h ar vriant stadet war ar skinlunioù tennet a-veskell diaraok kleiz, arouez ar c'halonnaouedoù ganedigell gant isteñv pe ezvezañs kef ar skevent.
- fenêtré** ◇ **fenestrated** ◇ **bualierek** aa. A-zivout an teltoù, ar palastroù a zo bet graet digoroù enno.

fenêtr-

• *capillaires fenêtrés, capillaires à pores* korrwazhied bualierek ◇ *l'intervalle entre les deux seuils est appelé bande passante ou fenêtre* an entremez etre an daou hin a reer anezhañ ar bann drafet pe an draf.

fente sphénoïdale : syndrome de la ~ ◇ **sphenoidal fissure syndrome** ◇ **azoniad ar skarr krec'h** Seizi untu eus an III^e, IV^e, VI^e nervernoù a-glopienn hag eus barr a-lagad ar VI^e, e dianlen un amaskornennfo eus skarr krec'h ar pod lagad, ur yoc'henn, un torr, un darvoll, pe ur c'hevnegnennfo a gefinded; naous ent klinikel dre ul lagadseizi klok, ur malvennislink, ur raklagadegezh, ur mabusvoll, ur steuz eus damougou ar mab hag ar gornsaes, un aneraez a 'r voull lagad, a 'r valvenn grec'h, a 'n tal hag eus gwrizienn ar fri.

fer ◇ **iron** ◇ **houarn g.** Elfenn gimiek a niverenn atom 26, arouez Fe; an atom houarn a c'hell koll 2 elektronenn ha mont da ion divamsavus (houarnus Fe²⁺) pe 3 elektronenn ha mont da ion teiramsavus (houarnek Fe³⁺); e korf mab den e vez etre 4 ha 5 g houarn; en e furn divamsavus emañ e kreiz ar molekul hemoglobin ha c'hoari a ra ur roll a bouez e dezougen an oksigen (sl. *anémie ferripive, ferritine, hémochromatose, hémoglobine, hémosidérine martial, pica, porphyrine, sidér-* ha deveradoù, *transferrine*).

Ferguson Smith : maladie de ~ ◇ **Ferguson Smith's epithelioma** ◇ **kleñved Ferguson Smith** Kleñved herêzhel treuzkaset er mod trec'hek aotzomek, naous dre anafoù kroc'hen o tarvezout gant an oadour yaouank, war ar parzhioù dizolo, liesstumm, heñvel pe ouzh krugennoù an akne da greiz dezho ur stev keratozek arzu, pe ouzh un epiteliom gourc'hennelligel pe diazkelligel, pe ouzh ur c'heratoakantom, elfennoù holl o steuziañ diouto o unan e-tro ar pemontvet bloavezh.

férin : toux ~e ◇ **paz g. peukennek, peukenn b.** Paz sec'h, raouliet, dalc'hus, heñvel ouzh garm al loened gouez.

ferment ◇ **ferment** ◇ **goell g.** Danvezenn o tec'han ar goiñ; enzimou eo an darn vuiañ eus ar goelloù, dedaolet lod anezho gant korrevedegou (sl. *fermentation, levure*).

ferment jaune de Warburg ◇ **yellow enzyme** ◇ **goell melen Warburg** Enzim o tisoc'h diwar gengediañ an ester fosforek, ar flavin (vitamin B₂) hag ur protein, dezouger hidrogen, gantañ ur roll a bouez e kennevid kelligel ar glukid.

ferment respiratoire, ferment transporteur d'oxygène, cytochrome-oxydase ◇ **Warburg's ferment** ◇ **goell analadel, goell dezouger oksigen** Oksidaz ennañ houarn a ve e roll, en analañ kelligel, blivaat an oksigen hag e dreuzdougen d'ar c'hitokrom.

fermentation ◇ **fermentation** ◇ **goiñ, goerezh g.** Dazgwered bevgimiek anaerat trelusket gant goelloù (enzimou); ar goiñ alkoolel zo anezhañ treuzfurmiañ kediaoù glukidek en etanol.

ferm-

• *canal fermé par les apophyses transversaires et par les muscles intertransversaires* kanol gronnet gant ar balegoù treuz ha gant kigennoù ar balegoù treuz • *cavité fermée en bas par le périnée* kavenn klozet en traoñ gant ar c'harbedenn • *circuit fermé, circuit semi-fermé* amred kloz, amred dangloz • *fermeture de la communi-cation interatriale* serrañ ar c'hehentad etre-kentezoù • *fermeture des sigmoïdes* serridigezh ar sac'helloù kornloarek • *fermeture des valvules auriculoventriculaires* serridigezh an trapigou kentez-kofig • *fermeture du moignon duodénal* serrañ skarvenn an daouzegegn • *gouttière neurale après sa fermeture* andenn an arc'hnerveg goude ma vez dlidet • *volume de fermeture* ec'honad serrañ.

ferritine ◇ **ferritin** ◇ **ferritin g.** Keurvolekul dourzileizh, ouzh e ober ur grogen broteek (apoferrin) en dro d'ur graoñell hidrosidenn houarn; drezañ e vez kadavet an houarn en avu, ar felc'h ha mel an eskern; gant ar gourev emañ feur reol ar ferritin etre 23 ha 233 ng/mL ha gant ar venev en he hoal ganadel etre 10 ha 107 ng/mL.

fertilité ◇ **fertility** ◇ **frouezusted b.** Gouested da engehentañ bugale.

festination ◇ **festination** ◇ **arzifraeañ** Bezañ tuet da vuanaat ar c'herzhed evit mirout a gouezhañ war-raok, azon eus anaezioù 'zo (kleñved Parkinson), kentañ derez ar rakkorzhañ (sl. *latéro-pulsion, propulsion, rétropulsion*).

fétichisme ◇ **fetichism** ◇ **fetichégezh b.** Troziadezh revel a ra d'ar gouzrec'h kemer da ergerc'henn un draezenn pe ul lodenn gorf (sl. *paraphilie, perversion*).

feuilles embryonnaires ◇ **embryonic layers** ◇ **feilhañnoù l.(b.) rizhellel** An teir lavnenn (ektoderm, mezoderm, endoderm) dispaket diouzh ar blastoderm, kennenn gezivik ar rizhell.

feuilles extra-embryonnaires ◇ **extraembryonic layers** ◇ **feilhañnoù amrizhellel** Trobarzhioù ar feilhañnoù rizhellel a yelo d'ober adparzhioù ar grouell (sl. *annexes embryonnaires*).

fibrate ◇ **fibrate** ◇ **fibrat g. -où, -eier** Renkad liaoù erskrivet ouzh ar gwadusvec'h lipid.

fibre ◇ **fiber** ◇ **gwienn b.** Edañvenn pe gellig hirvoan parzhiat er gwiadoù struzhel ha loenel.

fibre collagène ◇ **collagen fiber** ◇ **gwienn gollagen** Edañvenn eus ar gwiad kenglenel, ansavelet he hed, warni ur rizennadur treuz 64 nm trovezh, ur protein dibarek ouzh he ober, ar c'hollagen (sl. *collagène*).

fibre élastique ◇ **elastic fiber** ◇ **gwienn dastennek** Edañvenn eus ar gwiad kenglenel, hir ha fin (etre 1 ha 4 µm treuzkiz), unneuziek, gwevn kenan ha dastenn bras ganti, ouzh he ober ur skleroprotein, an elastin.

fibre grillagée ◇ **network fiber** ◇ **gwienn roellus** Gwienn retikulina stallet e-giz un treilh en dro da wazhied parenkimou 'zo evel an avu pe ar felc'h.

fibre musculaire, cellule musculaire, myocyte ◇ **muscle fiber, muscle cell** ◇ **gwienn gaher, kaherwienn b., kahergellig b., miokitenn u.** Kellig diforc'hek kenan, e piaou d'an arc'hwel argrezañ, hir he furm hervez an ahel ma wered, bezant en he c'hitoplasm furmadurioù argrezus, ar c'*haherwianoù* (Gl. *myofibrilles*); e daou rumm e tific'her ar miokit : 1) ar c'*haherwiennoù levn* (Gl. *fibres musculaires lisses*), etre 20 ha 200 µm hed, loet o c'hraoñell en o c'hreiz, oc'h argrezañ gorrek hag andiarvenn; bezant int a-unanoù er gwriad kenglenel pe strollet e saeoù ar gwazhied hag ar ganol vezhur; 2) ar c'*haherwiennoù rizennek* (Gl. *fibres musculaires striées*), etre 1 mm ha lies cm hed hag etre 10 ha 100 µm treuzkiz, lieskraoñellek, enno kaherwianoù o c'hoarvezout eus un heuliad sarkomeroù oc'h anadiñ e rezh rizennoù dindan ar c'horrgresker; dewerc'herioù an argrezañ diarvenn, bezant er c'higennoù rizennek enlenet ouzh an eskern.

fibre musculaire striée cardiaque, cellule myocardique ◇ **cardiac muscle fiber** ◇ **kaherwienn rizennek kalon, kellig kalongaher** Kahergellig unkraoñellek, enni kaherwianoù unluiniad gant re ar c'higennoù rizennek, oc'h argrezañ andiarvenn, a-gorvez hag emgefreak.

fibre nerveuse ◇ **nerve fiber** ◇ **gwienn nerval, nervwienn b.** An hirañ eus astennadoù an neuronenn, anezhañ un akson gronnet pe get gant ur feur vielin hag ur feur Schwann; e-barzh an nervreizhiad kreiz ez a an nervwiennoù d'ober ar steuñvenn wenn, hag int mielinek pe anvilinek ha hep feur Schwann; en nervreizhiad trobarzh e kaver ar feur Schwann dalc'hmat (sl. *axone*).

fibre de réticuline, fibre réticulaire ◇ **reticular fiber** ◇ **gwienn rouedek** Edañvenn wiad kenglenel, etre 0,2 ha 2 µm treuzkiz, argantlen, stael e rezh ur rouedad mailhoù gwech ledan en dro d'ar gwazhied, d'ar c'haherwiennoù, d'an nervwiennoù, h.a., gwech strizh; kedrann bennañ an diazkennenoù (er gwagrennoù, en epiteliennoù).

fibres alimentaires ◇ **dietary fibers** ◇ **gwiennoù bouedel** Dilerc'hiadoù edañvennek diwar ar bouedoù struzhel andourrannet gant enzimoù ar c'hoaz-hañ, amparet gant kellulozioù, hemikellulozioù, pektinoù, ligninoù, h.a.; o diforc'hiñ a reer diouzh ar *gwiennoù krañ* (Gl. *fibres brutes*) a zo dilerc'hiadoù struzhel andourrannet gant an trenkennoù hag an alkaliou.

fibres arquées ◇ **arcuate fibers** ◇ **gwiennoù gwar** Gwiennoù kevreañ berr etre troennoù amezek an empenn.

fibres longues ◇ **syndrome des ~, myélose funiculaire** ◇ **Lichtheim's syndrome** ◇ **azoniad ar gwiennoù hir, mieloz g. hordenel** Azoniad o kevredañ arouezioù eus tizhadur an hordennoù moan ha gennheñvel (mieraez ouzh ar froum hag ouzh lakadur an izili, ankedre) hag un azoniad pikernennek; an arbenn liesañ anezhañ o vezañ an amwad yud.

fibres thalamocorticales ◇ **corticothalamic fibers** ◇ **hordennoù l. (b.) derc'hvelpluskenn** Gwiennoù o vont eus an derc'hvel d'ar bluskenn a ve ganto ur roll heudañ.

fibrillation ◇ **fibrillation** ◇ **1 krehad g. (gwiennel), gwiengrehad g. 2 krehad kalon, kalongrehad** 1 Argrezadenn digevret ur gaherwienn, dihwel ent klinikel, anataet e rezh barrgemmoù berr er c'hahervarrwezañ, dindan 2 ms pad ha 300 µV heled, izeldalm, oc'h erzerc'haat gwerederezh tredanel emdarzh ur gignenn dinervet. 2 Kenheuliad herrek ha direoliek argrezadennoù ar c'haherwiennoù kalon o tisoc'h gant seizi ar c'havennoù; peurliesañ e chom kantet er c'hentezoù (*krehad kentezel*, Gl. *fibrillation atriale*) ha dec'han ankorvez ar c'hofigoù (sl. *arythmie complète*); gant tizhad ar c'hofigoù (*krehad kofigel*, Gl. *fibrillation ventriculaire*) e tarvez arsav ar galon hag ar marv (sl. *arrêt cardiaque*).

fibrillo(-)flutter ◇ **flutter fibrillation** ◇ **gougren-krehad g.** Stad ar c'hentez tizhet a bep eil gant krehad ha gant gougren (sl. *flutter*).

fibrine ◇ **fibrin** ◇ **fibrin g.** Globulin andileizh, kedrann bennañ ar gaouledenn wad, furmet diwar ar fibrinogen dindan wered an trombin.

fibrinoformation ◇ **fibrin formation** ◇ **fibrinurmiñ** Gdanzen ar gaouledenn fibrin diwar ar fibrinogen (sl. *coagulation : facteurs de la ~*).

fibrinogène ◇ **fibrinogen** ◇ **fibrinogen g.** Parenn I ar c'haouledañ, diaraoger ar fibrin, globulin hezileizh a volekul bras enaozet gant an avu, bezant e plasma ar gwad hag e naouezennoù levrus 'zo.

fibrinogénémie ◇ **fibrinogenaemia** ◇ **fibrinogenwadvec'h g., gwadvec'h g. fibrinogen** Feur ar fibrinogen amredat er gwad (etre 1,5 ha 3,5 mmol/l ent reol), muiaet er stadoù foel.

fibrinogénopénie, hypofibrinogénémie, hypofibrinémie ◇ **fibrinogenopenia, hypofibrinogenaemia** ◇ **fibrinogenwadvec'h, gwadvec'h fibrinogen, olfibrinogen g.** Leiadur feur ar fibrinogen er gwad dindan 20,5/1; e dianlen un isvec'h re vras e tarvez un dilerc'h kaouledañ ha gwadliñvoù; ar *gwadanvec'h fibrinogen* (Gl. *afibrinogénémie*) eo peurezevezañ ar fibrinogen er gwad; deskrivet eo bet an *olfibrinogen ganedigel* (Gl. *hypofibrinogénémie congénitale*), kleñved hêrezhel dibaot treuzkaset er mod aotozomek trec'hek pe enkilek diwar mienaoz ar fibrinogen, ar gwadvec'h anezhañ o vezañ dindan 0,75/1, ken grevus hag ar gwadanvec'h; an *olfibrinogen arzeuat* a zarvez e-kerz ar skorted avu, ar c'haouledañ engwazhiedel strewet, ar fibrinloezañ kentael (sl. *coagulation intravasculaire disséminée*) pe an adaverezh proteek.

fibrinokinase ◇ **fibrinokinase** ◇ **fibrinokinaz g.** Enzim bezant er plasma en ur furm anniñvek; goude enniñvañ e tasperzh e treuzfurmidigezh ar profibrinolizin e fibrinolizin.

fibrinolyse ◇ **fibrinolysis** ◇ **fibrinloezañ, fibrinloez g.** Teskad an argerzhioù o tisoc'h gant dispenn ar fibrin ha, dre se, ar gaouledenn wad (*kaouledloezañ*, Gl. *thrombolyse*), anadenn o c'hoarvezout devezhioù pe sizhunvezhioù goude furmidigezh ar gaouledenn; pa zarvez re brim e c'hell dec'han gwadliñvoù grevus goude un oberatadenn, ur gwilioud, ur sioc'hanad pe ur bleuz daraezel; kentael a-wechoù, peurliesañ e vez eilvedel, erwezhiat ouzh un azoniad a'r c'haouledañ engwazhiedel strewet.

fibrinolysine, plasmine, thrombolyse, tryptase ◇ **fibrinolysin** ◇ **fibrinolizin** g. Enzim proteinloezat plasmatek danzeet dre enniñvañ ar profibrinolizin, o tispenn ar fibrin hag ivez ar fibrinogen, ar proakelerin, ar barenn antihemo-filiek A hag ar glokaenn.

fibrinolytique ◇ **fibrinolytic** ◇ **1 fibrinloezus** aa. **2 fibrinloezur g.-ioù** 1 O tispenn ar fibrin hag ar c'haouled gwad. 2 Lia fibrinloezus, erskrivet peurliesañ ouzh angwazhiad ar c'haher kalon, sk. : ar *streptokinaz*.

fibrinoplastique ◇ **fibrinoplastic** ◇ **fibrinbarus** aa. O tevoudañ furmidigezh ar platin.

fibrinurie ◇ **fibrinuria** ◇ **troazhfibrinegezh** b. Ezvevennad fibrin pe fibrinogen dre an troazh e-maez nep troazhwadegezh; kaoulediñ a ra an troazh el lounezh, er c'hwezhiell pe goude an dezioulañ.

fibroblastes ◇ **fibroblasts** ◇ **fibroblast** s. Kelligoù gwerzhidek pe steredennek eus ar gwiad kenglenel, o tanzen ar gwiennoù kollagen, rouedek, dastennek hag oc'h enaozañ an darn vuiañ eus kedrannoù ar vondanvezenn.

fibroblastome ◇ **fibroblastoma** ◇ **fibroblastom** g. Yoc'henn a stader e kleñved Recklinghausen, a evodfe diouzh ar fibroblast ha diwar feur an nervedoù.

fibrocytes ◇ **fibrocytes** ◇ **fibrokit** s. Fibroblast azv, kollet ganto lod eus o ferzhioù enaozañ.

fibrélastose de l'endocarde, fibrose cardiaque du nourrisson ◇ **endocardial fibroelastosis** ◇ **fibroelastoz g. an enkalonenn** Anaez dianav e arbenn, o tarvezout gant ar vagadell pe ar bugel yaouank, naouus, *ent neuziadurel*, dre devadur bloc'hel an enkalonenn, aet ganti un arvez laezhek, porselenek ha paotet enni gwiennoù kenglenel, re zastennek dreist holl; ec'honek eo ar galon, usvollek hag usteñvek ar c'hofig kleiz; *ent klinikel*, dre strafuilhoù koazhadel, dilerc'h ar c'hreskiñ, hag abred skorted ar galon gant trec'hwezhañ ha gouliñv ar skevent; marvus eo hogos bepred.

fibromatose ◇ **fibromatosis** ◇ **fibromatoz** g. Dispakadur yoc'hennoù stirek e lec'hiennoù 'zo eus ar bevedeg, loet peurliesañ er gwiad kellaouek endan-groc'henn; tuet int da adfeilhañ goude ezvenañ, nemet e vanont hep dassezañ.

fibroma ◇ **fibroma** ◇ **fibrom** g. Yoc'henn guñv amparet gant gwiad stirek hepken, eleze gant hordennoù gwiad kenglenel ha kelligoù kenglenel strewet en o mesk.

fibrome non ostéogénique ◇ **nonossifying fibroma** ◇ **fibrom anaskornaus** Yoc'henn guñv diwar ardalpenn an eskern hir gant ar vugale, anezhi gwiad stirek hepken.

fibromyome ◇ **fibromyoma** ◇ **fibromiom** g. Yoc'henn grozh amparet gant gwiad kenglenel ha gwiad kaher lev; alies e lakaer warni an anvadoù *fibrom*, *yoc'henn stirek* pe *korf stirek*; ent wiadoniell ez eus anezhi ur *miom* (Gl. *myome*).

fibronectine ◇ **fibronectin** ◇ **fibronektin** g. Glikoprotein etre 440 ha 550 kilodalton e dolz mol, bezant ur furm anezhañ ebarzh ar plasma, ma wered evel oponin anspesadel, hag ur furm all loet ken e gorre kelligoù diseurt, ar pladanoù pergen, ken e-barzh ar gwiad kenglenel, hini speurioù ar gwazhied da skouer, o tasperzhiañ en etreglenadur ar c'helligoù, er c'hleizennañ, e trevnadur entremezioù ar gwiadoù hag e stabiladur ar gaouledenn.

fibrosarcome ◇ **fibrosarcoma** ◇ **fibrosarkom** g. Yoc'henn kenglenel yud evodet diwar ar fibroblast.

fibroscope ◇ **fibrescope** ◇ **fibroskop** g., **edañvengweler g. -ioù** Seurtad endoskop (luc'hwereer) o vukañ un hordenn luc'h ouzh speur un organ diwar-bouez ur feskenn edañvoù kouarz, arveret da erc'hwiliañ war eun, da luc'h- pe fiñvskeudenniñ, pe da funweliñ glaourgen ar bronkez hag ar ganol vezhur; hervez treur an hordenn luc'h e tiforc'her ar *fibroskop saezhvuk* (Gl. *fibroscope à vision axiale* pe *terminale*), arveret da arseliñ an treizher hag ar stomok, hag ar *fibroskop treuzvuk* (Gl. *latéofibroscope*, *latéroscope*), arveret da arseliñ ar stomok.

fibroscopie ◇ **fibroscopy** ◇ **luc'hengweliñ, edañvengweliñ** Luc'hwereañ antrewan kanolioù pe gavennoù ar bevedeg dre araer ar fibroskop.

fibrose ◇ **fibrosis** ◇ **fibroz** g. Anaf anspesadel naouus dre uswe ar gwiadoù kenglenel ha neridigezh ar fibroblast hag ar fibrokit, sk. *fibroz kleizennel* (Gl. *fibrose cicatricielle*).

fibrose pulmonaire interstitielle diffuse ◇ **diffuse interstitial pulmonary fibrosis** ◇ **fibroz entremezel strewek ar skevent** Anaez dibaot, dianav e arbenn, naouus, *ent neuziadurel*, dre skleroz aloubus ar gwiad entremezel a-bezh eus ar skevent, o tevoudañ dreist holl tevadur ar speur logig-korrwazhied hag o skoilhañ dre se ouzh fuidigezh an oksigen; *ent klinikel*, dre un trec'hwezhañ argreskus gant dulaz ha paz; er skinlunioù e stader demerrennoù daoudu ha strewek, greunvañheñvel, rouedek pe nozelanek; an dedro a ya d'ar marv dindan un nebeut mizioù pe vloavezhioù.

fibrosite, polyenthésopathie, syndrome polyalgique idiopathique diffus ◇ **fibrositis** ◇ **stirfo g., liesenlenfo g., azoniad liesgostel hennadek strewek** Tanienn a orin remmel alies ar gwiad stirek arzel pe troarzel; devoudañ a ra laurioù hag a-wechoù angrizadoù, sk. : *kleñved Dupuytren* (sl. *maladie de Dupuytren*).

fibr-

• *action fibrosante* gwered fibroseiat • *alvéolite fibrineuse* logigfo fibrinek • *antifibrillant* enepkrehad, enepkrehadeg • *canal ostéofibreux* kanol askornstirek • *canal ostéofibromusculaire* kanol askornstirkaherek • *cartilage fibreux, fibrocarti-lage* migorn stirek, stirvigorn • *chorée fibrillaire* korea krehadeg • *dépolariation de la fibre myocardique* divleinekaat ar wienn gaher kalon • *fibres conjonctives entrecroisées* gwiennoù kenglenel daskroaziet • *fibres d'amiante* edañvoù asbest • *fibres de quartz* edañvoù kouarz • *brides fibreuses entre deux points de la paroi amniotique* naskoù stirek etre daou boent eus speur un amnion • *fibrillation auriculaire* krehad kentez • *fibrillation myocardique* krehad ar c'halongaher • *fibrilles musculaires* kaherwianoù • *formation fibreuse cloisonnant la cavité d'un abcès* furmadur stirek o tilhennañ kavenn ur pugnez • *fusion des trois valves en un diaphragme*

fibreux an teir sac'hell, kempeget, o vont d'ober ur stiv stirek • *gaine fibreuse* kavñ stirek • *les fibres du collagène* gwiennou ar c'hollagen • *manchon fibreux* gronnenn stirek • *pneumoconiose minérale fibrogène* analeuflegez veinel fibroseiat • *processus fibreux* argerzh stirekaat • *résidus fibreux moisis de canne à sucre* dilerc'hiou edañvek louedet ar c'horz sukr • *resserrement fibrillaire dans les cellules* startaat ar gwianou er c'helligou • *secousses fibrillaires des muscles striés* krehadoù ar c'higennoù rizennek • *substance fibreuse néoformée* steuñvenn stirek nevezfurmet • *système fibrillaire collagène* trevnad gwiennou kollagen • *tissu conjonctif fibreux ou fibro-hyalin* gwiad kenglenel stirek pe stirwerek.

fibula ◇ **fibula** ◇ **spilhenn** b. Askorn diavaez ar c'har (darbennet eo bet an anvad *fibula* e-lec'h Gl. *péroné* gant an destladurioù etrevroadel PNA ha TA).

1 fièvre, hyperthermie 2 fièvre, pyrexie ◇ **1 fever, hyperthermia 2 fever, pyrexia** ◇ **1 terzhienn b., gwrester g., uswrez** b. **2 terzhienn** 1 Uheladur ezreol eus gwrezverk ar c'horf. 2 Azoniad naouus dre uheladur gwrezverk kreiz ar c'horf er paouez, dreist 37,5°C diouzh ar beure ha 37,8°C diouzh an noz, buanadur ar pouz hag an anal, troazhisvorc'h, sec'hded an teod, alfo a-wechoù.

NOTENN : I – Tennañ a reer da lakaat kemm etre Gl. *fièvre* (Br. *terzhienn, gwrester*) “uheladur gwrezverk ar c'horf dre berzh un dislank war grec'h eus ar gwrezreoler loet er gouzerc'hvel” — pa vez ar bevedeg oc'h engwezhiñ araезioù stourm ouzh ur c'heuziad, ha Gl. *hyperthermie* (Br. *uswrez*) “uheladur gwrezverk ar c'horf pe ur parzh anezhañ da heul tommder an amva pe ul labour kigenñel start” — ar bevedeg oc'h engwezhiñ neuze araезioù difenn ouzh an amveziadoù : c'hweziñ, gwazhiedfrankaat, paouez.

NOTENN : II – An termen Gl. *fièvre* (Br. *terzhienn*) a arverer gant un destier evit envel kleñvedoù terzhiennek, sk. : Gl. *fièvre jaune*, Br. *terzhienn velen*.

fièvre aseptique ◇ **aseptic fever** ◇ **terzhienn anporeel** Terzhienn o c'hoarvezout er-maez a nep poread garvevel.

fièvre à pappataci, fièvre à phlébotome, dengue méditerranéenne, fièvre de Pick, fièvre de trois jours ◇ **sand-fly fever, pappataci fever, three-day fever, Chitral fever** ◇ **terzhienn ouzh pappataci, terzhienn ouzh flebotom, deng morkreizat, terzhienn Pick, terzhienn tri devezh** Pore naouus dre varrou feuls terzhienn o teraouiñ trumm hag o padout tri devezh, da ragazon dezho klopennadoù ha kig-torr, hag alies kevret ganto kalonistead, strafuilhoù koazhadel hag un eritem skarlegvanek; o parañ bepred; kiriek eo un arboviruz eus ar genad *Phlebovirus* trezouget gant un dipter bihan, *Phlebotomus papatasi*.

fièvre bilieuse hémogloburique ◇ **melanuric fever** ◇ **terzhienn vestlus troazhhemoglobinek** Erzerc'had grevus ar baludegezh dre *Plasmodium falciparum* o tizhout paludeion henek, o teraouiñ gant ur gwadloezañ engwazhiedel trumm azonet dre gridiennoù, terzhienn uhel, fillidigezh, c'hweladoù, iktet, amwad hag un droazhhemoglobinegezh a c'hell dedreiñ en traozha hag en ur skorted lounezh marvus.

fièvre bilioseptique ◇ **bilious fever** ◇ **terzhienn vestlus** Gwaskad trumm terzhienn ha kridiennoù e-doug un nebeut eurvezhoù, heuliet gant ur gouikter, erzerc'had un angiokolit.

fièvre boutonneuse méditerranéenne ◇ **(eruptive) Mediterranean fever, boutonneuse fever** ◇ **terzhienn borbolennou, terzhienn vorkreizat** Pore terzhiennek eksantematek o teraouiñ dre ul livant enkoriñ, kiriek dezhañ *Rickettsia conorii* trezouget gant tarlask pe gant c'hwen ar c'hi, ar c'hi o vezañ mirva ar viruz.

fièvre de croissance ◇ **febrile growing pains** ◇ **terzhienn greskiñ** Bommou gwrester, kevret a-wechoù gant azonoù hollek, laurioù e talpenn an eskern, a-geñver gant kresk herrek an dud yaouank.

fièvre de Lassa ◇ **Lassa fever** ◇ **terzhienn Lassa** (Lassa, kêr eus biz Nigeria) Pore bro-darreziat Kornogafrika diwar ur viruz dre RNA, eus ar genad *Arenavirus*, viruz Lassa, tredizhus kenan; mirva ar viruz, ur razh, *Mastomys natalensis*, zo astennet e drigvaez da Afrika susaharat a-bezh; da heul ur gounervezh a 3 da 16 devezh ez a ar c'hleñved erzerc'h dre un azoniad poreel garv : gargadenno, gouliñv an dremm hag ar gouzoug, tizhadur ar benvegadoù analadel, kalongwazhiedel, koazhadel, h.a., a-wechoù gant gwadliñvoù ha dispuilhadoù kroc'hen; a 1 da 3 sizhunvezh e pad ar gwrestervezh; en hanter eus an degouezhoù e tedro ar c'hleñved d'ar marv.

fièvre de sel ◇ **salt fever** ◇ **terzhienn an holen** Gwrester dec'hanet er vagadell gant ur boueta re sall hag an azaldc'h NaCl; an dour eret ouzh ar reñver holen ne dalvez mui da reolerezh ar gwrezverk.

fièvre de soif ◇ **dehydration fever** ◇ **terzhienn an दौरисvec'h** Gwrester trumm o tarvezout gant an nevezc'hanidi hag an oadourion e-kerz ar rannvloaz tomm diwar diouer an euvriñ dour.

fièvre des fondeurs ◇ **foundry-man's fever, zinc fever** ◇ **terzhienn an deuzerion** Anez diwar dewentañ ar vurezh o sevel diwar deuzerezh ar zink ha metaloù all evel ar stibion, ar c'hobalt, ar c'houevr, h.a., naouus dre ur paz sec'h hag, un nebeut eurvezhoù goude, un azoniad gripvanek gant terzhienn uhel ha kaherostou.

fièvre des marais ◇ **grippotyphic leptospirosis** ◇ **terzhienn ar parkeier** Leptospiroz diwar *Leptospira grippo-typhosa*, o tizhout ar wezhourion douar hag ar re a labour er fank, naouus dre un deroù feuls, un derzhienn c'harv, asikted, klopennad, kaherostou, a-wechoù darwazh ar c'hevresaeoù, gouikter ha troazhproteinegezh; darvezout a ra ar pare a-benn un nebeut devezhoù (sl. *leptospirose*).

fièvre des tranchées, fièvre d'Ukraine, fièvre de la Meuse, fièvre aiguë tibialgique ◇ **French fever** ◇ **terzhienn ar foziou brezel, terzhienn lemm skinostek** Pore bro-darreuziat, terzhiennek ha gourlaurek, diwar *Rickettsia quintana*, treuzkaset, evel an tifuz, dre ziouladoù al laou, naouus ent klinikel dre laurioù eskern grizias sezet dreist holl er skinoù.

fièvre fluviale du Japon, tsutsugamushi, fièvre des broussailles ◇ **tsutsugamushi disease, scrub typhus, Japanese river fever** ◇ **terzhienn japanat ar stêrioù, sutsugamushi, terzhienn ar strouezh** Anaëz grevus a gaver e Japan, Taiwan hag en Indonezia, diwar vrazhad *Trombicula akamushi* oc'h enkoriñ ur riketsi, *Oriental tsutsugamushi*; oc'h erzerc'hañ dre un anaf marvenn e poent ar brazhad, ur c'hwarrenn geñverek, eksantemoù, olgwenn hag ur grommenn wrezverk a neuz tifoidel; ar vorzigell voutin japanat e ve mirva ar viruz.

fièvre hémorragique d'Extrême-Orient, fièvre russo-asiatique ◇ **Far Eastern haemorrhagic fever, Nikodo disease** ◇ **terzhienn wadliñvus ar Reter pellañ, kleñved Nikodo** Viroz trezouget gant tarlask, erzerc'h ent klinikel dre un azoniad gwadliñvel hag empennfoel.

fièvre hémorragique épidémique ◇ **epidemic haemorrhagic fever** ◇ **terzhienn wadliñvus darreuziat** Anvad rumm ar c'hleñvedoù darreuziat diwar viruz (*Arenavirus, Filovirus, Flavivirus, Bunyaviridae*) da azon dezho ar gwadliñvañ (*deng, kleñved diwar viruz Ebola, kleñved koadeler Kyasanur, terzhienn draoññan ar Rift, terzhienn diwar viruz Marburg, terzhienn Lassa, terzhienn velen, terzhienn wadliñvus Suamerika, h.a.*).

fièvre intermittente ◇ **intermittent fever** ◇ **terzhienn spanaus** Furm derzhienn naouus dre varroù etrezo entremeziou angwrester; azonus a-wechoù d'ul linadur don (avufo linus, poread troazhadel, enkalonennfo angreizhek, poread linek), peurliesañ avat ez eus anezhi un erzerc'had a 'r baludegezh (sl. *double quarte* : *fièvre* ~, *double quotidienne* : *fièvre* ~, *double tierce* : *fièvre* ~, *doublée* : *fièvre tierce* ~, *fièvre bilieuseptique*).

fièvre jaune, fièvre amarile, vomito negro ◇ **yellow fever, amarillic typhus, typhus icteroides, bulam** ◇ **terzhienn velen** Pore bro-darreuziat, daou annon dezhañ, suamerikat hag afrikat er gelc'henn drovanel; naouus dre un deroù feuls, terzhienn da 40°C, laurioù grizias er c'hloppenn hag el loan, c'hweladoù, darwazh an dremm ha yazad ar bruski; a-benn 3 pe 4 devezh e c'houz ar derzhienn ha, goude ur remotad leiek, e teu ar pare; er furmoù grevus, e tistro ar gwrester, hag e tarvez c'hweladoù gwadek, ikter ha troazhproteinegezh, testoù da dizhadur an avu hag al lounezhi, marvus alies; kiriek eo ar viruz *amaril*, eus ar genad *Flavivirus* eus kerentiad an *Togaviridae*, trezouget gant moustiked eus ar genadoù *Stegomia* e kêr, *Haemagogus* e strouezh Suamerika, *Aedes* en Afrika; ergurañ a reer ar c'hleñved dre ur vaksin (viruz bev distavet).

fièvre par morsure de tique, fièvre à tique(s) ◇ **tick-borne typhus, tick-bite fever, ixodiasis** ◇ **terzhienn diwar vrazhad tarlask, terzhienn diwar darlask, iksoadias g.** Anvad rumm ar poreoù trezouget gant an tarlask, na pa ve an hadenn gleñvedus ur *Rickettsia* (terzhienn vouk ar Menezioù Roc'hellek), ur *Borrelia* (terzhiennnoù arreadek, skignek), ur *Babesia* (piroplasmioziou loenel) pe ur viruz (terzhienn diwar darask Kolorado).

fièvre paratyphoïde ◇ **paratyphoid fever** ◇ **paratifoid g., terzhienn baratifoidel** Kleñved heñvel ent klinikel ouzh an tifoid, diwar ur bakteri nes da vazhell Eberth, *Salmonella paratyphi*.

fièvre pernicieuse ◇ **pernicious malaria, severe malaria** ◇ **terzhienn c'hanas** Furm baludegezh grevus hag a-wechoù marvus prim, diwar *Plasmodium falciparum* peurliesañ, o tarvezout gant gouziviaded wanaet en un tared broezeziadek, naouus dre un azoniad yud deraouet trumm, anezhañ angremm, fillidigezh, koempad kalongwazhiedel, c'hwezadoù yen, dulaz ha yenadur trobarzhel en desped d'an uswrez kreiz, amwad, c'hweladoù ha darc'hoal o tec'han dourisvec'h, antroazh ha gwadusvec'h urea; ar furm empennel, an *derzhienn nerval* (Gl. *neuropaludisme, Sz. cerebral malaria*), a vez o teraouiñ gant krenerezh, alfo ha gouruswrez hag oc'h echuiñ gant ur c'homa habask hag alies ar marv.

fièvre pourprée ou pétéchiiale ou tachetée des Montagnes Rocheuses, fièvre du Texas ◇ **Rocky Mountains spotted fever, mountain fever** ◇ **terzhienn vouk pe fennigaouek pe maelennek ar Menezioù Roc'hellek, terzhienn an Teksas** Kleñved rannvloaziad (gwianten, hañv) o reuziañ e rannbarzh ar Menezioù Roc'hellek hag en India, diwar *Rickettsia rickettsii*, trezouget gant tarlask (*Dermacentor andersoni*); naouus dre un deroù trumm (kridiennoù feuls), gwrester uhel kenan adalek an deizioù kentañ, ur stad tifek grevus hag un dispuilhad fennigoù puilh o tarvezout etre an eil hag ar pempet deiz; uhel eo ar varvusted (sl. *typhus de São Paulo*).

fièvre Q, fièvre de Queensland ◇ **Q fever, Queensland fever** ◇ **terzhienn Q, terzhienn Queensland** (Q zo pennlizh Sz. *query*, "argraf") Pore hennadet e 1910 war wezhourion ar c'horz sukr en Aostralia ha kavet abaoe 1933 war implijidi al lazhdioù, astennet hiziv da Amerika ha da vroeziou ar Mor Kreiz, treuzkaset eun (dre al laezh, an uloc'h), pe ameeun (dre al laou, an tarlask), kiriek dezhañ *Coxiella burnetti* a ve e virva ar c'hriagnered gouez hag ar chatal; ent klinikel e teskriver ur furm derzhiennek heñvel ouzh an tifuz eksantematek, o parañ hogos bepred, ur furm o tedreiñ evel ur skeventfo anreizhek, ur furm gripvanek hag ur furm bilhanel.

fièvre récurrente ◇ **relapsing fever, recurrent fever** ◇ **terzhienn arreadek** Anvad rumm poreoù naouus dre varroù terzhien arreat devoudet gant spiroket (*Borrelia*), trezouget gant artropod (laou pe tarlask) : *t. a. bedvroat* (Gl. *f. r. cosmopolite, Sz. European relapsing fever*) pore tredizhus ha darreuziat, diwar *Borrelia recurrentis*, treuzkaset d'an den dre ziouladoù al laou pe al louezaed, naouus dre ur grommenn derzhienn dibarek : goude ur barr gwrester uhel o padout etre 5 ha 7 devezh, deraouet hag echuet trumm hag ur prantad diderzhienn o padout keit all, e tarvez un eil barr heñvel ouzh an hini kentañ, heluiet gant ar pare; ar furmoù all, *t. a. skignek pe broezeziad* (Gl. *f. r. sporadiques, Sz. endemic relapsing fever*) a vez trezouget gant an tarlask : *t. a. spagnat* pe *spagnat-afrikat* (Gl. *f. r. espagnole* pe *hispano-africaine*), diwar *Borrelia hispanica*, enkoret gant tarlask (*Ornithodoros erraticus*), mirva an hadenn o vezañ krignered (heureuchin); *t. a. skignek ar Stadoù-Unanet* (Gl. *f. r. sporadique*

des États-Unis) seurtad kuñv diwar *Borrelia turicatae*, trezouget gant tarlask, *Ornithodoros turicata*; t. a. Suamerika (Gl. f. r. d'Amérique du Sud), diwar *Borrelia venezuelensis*, trezouget gant *Ornithodoros venezuelensis*; t. a. aziat pe persiat, seurtad grevus diwar *Borrelia persica*, trezouget gant *Ornithodoros papillipes*.

fièvre typhoïde, typhoïde ◇ **typhoid fever, typhoid** ◇ **terzhienn difoidel, tifoid** g. Pistribroad hollek, tredizhus, diwar *Salmonella typhi* (bazhell Eberth), naouus, *ent neuziadurel*, dre anafoù foel hag angreizhel war blakennoù Peyer ha bolc'hennoù kloz ar pervez, *ent klinikel*, dre un dedro e tri lankad seizh devezh : 1) terzhienn war gresk, 2) terzhienn a-wastad, gant tufoz, dar-c'hoal ha brizhennoù damroz 3) goude ur bazenn amzurc'hadek, terzhienn war zigresk; e diouer prederiadur, edo ar c'hlañvour en arvar rouestladou grevus : gwadliñvoù ha treloezadoù pervez, kalongaherfo, empenno; bennozh d'ar yec'hedouriezh, an ergurañ dre ar vaksinerzh hag ar bevastalgorañ ez eo et dibaot kaer an terzhiennoù tifoidel ha paratifoidel — a du 'rall, e Frañs ez eo endalc'hek an diskleriadur anezho.

figur-

• *difficulté à réaliser des figurations bi- ou tridimensionnelles* bec'h o kas da benn luniadurioù divvent pe deirment • *figure formée par les crêtes épidermiques des régions palmaires et des extrémités digitales* lun furmet gant kribennoù ezkroc'hen ar palvoù ha begoù ar bizied • *figure intra-érythrocytaire en anneau, en 8 ou en clé de sol* lunioù e stumm kelc'hienn, sifrenn 8, alc'houez sol a weler e-barzh an eritrokit • *les crêtes et les sillons épidermiques et leur configuration en lignes, boucles et tourbillons* kribennoù hag ervennoù an ezkroc'hen hag ar c'hefluniadur anezho e linennoù, dolennoù ha punelloù • *les pensées latentes sont modifiées en sorte qu'elles apparaissent défigurées dans le contenu manifeste* daskemmet e vez an dezevou enklat ken ez anadont dishevelebet e-barzh an endalc'hed diskelat • *réseau de fibrine retenant dans ses mailles les éléments figurés du sang* rouedad fibrin oc'h azderc'hel en he mailhoù elfennoù luniek ar gwad • *s'exprimer à l'aide de mouvements et de figures réalisées avec les doigts* eztaoliñ diwar-bouez fiñvadoù ha delvadoù ar bizied • *substance grise dont on étudie la configuration* steuñvenn louet a studier he c'hefluniadur.

filaires ◇ **filariae** (u. **filaria**) ◇ **filar** s. Arvevad eus urzhad an *Nematod* hir ha moan e gorf, rummet e lies spesad : *Filaria loa*, trezouget gant ar moui, o tec'han gouliñvoù dre zilec'hiañ dindan an amwiskadoù (sl. **loase**); *Filaria medinensis*, lies dekimetr hed (sl. **dracunculose**); *Filaria perstans*, ar rizheloù anezho o trigañ er gwad, diazon peurliesañ; *Filaria bancrofti* (*Wuchereria bancrofti*), arvevat ouzh gwazhied ar gwad hag al limf (sl. **filariose**); *Filaria ozzardi*, o trigañ en ampeleñ; *Filaria volvulus*, o reuziañ en Afrika drovanel, e Yemen, e Kreiz- hag e Suamerika, liesanafus (sl. **onchocercose**).

filariose ◇ **filariasis** ◇ **filariáz** g. Erialerezh gant filar ar gwad (*Wuchereria bancrofti*), oc'h erzerc'hañ dre zarvoudoù liesseurt : barroù terzhienn, nervoustoù, troazh-wadegedzh, troazh-sugennegezh, fennadoù limf, elefantiaziz; enkoret e vez rizheloù ar filar dre vrazhad un anofel; emañ an deznauñ e dalc'h anadadur an arvevad er gwad hag ar gwadveizprouad.

filière ◇ **scale, draw-plate** ◇ **stilhataer** g. **-ioù** Ardivink da vuzuliañ treuzkiz ar sontoù hag ar stilhoù kateteriñ.

fil-

• *aiguille monofilare, bifilaire* nadoz unedañv, divedañv • *bougie filiforme* stilh neudheñvel • *chacun des deux filaments constituant le chromosome* pep hini eus an div edañvenn a ya d'ober ar c'hromozom • *fil de platine maintenu incandescent par le passage d'un courant électrique* edañv platin dalc'het kann dre wred ur red tredan • *filière génitale* naoz ar genel • *les filets antérieurs et postérieurs de la branche gauche du faisceau de His* ar rannoù arad hag adreñv eus barr kleiz an hordenn genter-kofig • *les filets sympathiques de la carotide externe* strelloù simpatek ar garotidenn diavaez • *levure se développant sous forme d'une filamentation caractéristique* govev o tiñvañ e rezh un edañvad dezverkus • *médicament chef de file* gwezher penn stell • *mouches filaires* kelion filariüs • *phanère filiforme* faner neudennheñvel • *tige filetée* garenn sazelet • *un fil isolé* un edañv disfu • *un filament chauffé au rouge* un edañvenn tommet d'ar ruz.

film lacrymal ◇ **tear film** ◇ **daergoc'henn** b. Gwiskad liñvel moan war c'horre ar gornsae, o wareziñ an epitelienn, teir haen ouzh e ober, un haen c'hlaourek, diabarzh, borc'het gant kelligoù kibek ar gevresae, un haen etreat o tont eus borc'hadur gwagrennoù an daeroù, un haen diavaez, lipidek, borc'het gant gwagrennoù an tarsoù, oc'h arzerc'hel an daergoc'henn hag o virout na aezhennfe.

filtrat glomérulaire ◇ **glomerular filtrate** ◇ **silad** g. **bloueigel** Liñvenn o tisoc'h eus dreistsiladur plasma ar gwad a-dreuz speurioù korrwazhied ar bloueigoù, eleze kement hag 20 % eus ar plasma o tremen dre al lounezhi (etre 120 ha 130 mL/min evit un oadour bonan), enni, a un vec'h gant ar plasma, ar glukoz, ar c'hor, an natriom, an urea, ar fosfatoù, ar c'hreatinin, an drenkenn urek; evit andalañ perzhded an dreistsilañ e keñverier bec'h un danvezenn (kreatinin, inulin, mannitol) er plasma hag er silad bloueigel dre vuzuliañ an *dizeul lounezhel* (sl. **clairance rénale**).

filtration-réabsorption : théorie de la ~ ◇ **Ludwig's theory** ◇ **arlakadenn ar silañ-dassugañ** Arlakadenn ar borc'hañ lounezhel e vez hervezi holl elfennoù plasma ar gwad, nemet ar proteinoù hag an druzennoù, o silañ dre un argerzh fizikel adreuz ar bloueigoù, reoù 'zo eus an kez elfennoù o vezañ dassuget da c'houde, en holl pe e darn, gant ar pibelloù.

filtre électronique ◇ **electronic filter** ◇ **sil** g. **-où elektronek** Trevnad o kenstrollañ un dereell, un harzell hag un dougell, amkanet da melen un darn eus skalfad talmoù un arhent tredanel trovezhiek; diforc'hiñ a reer ar *siloù draf izel*, o herzel an holl dalmoù dreist ur gourin lavaret, hag ar *siloù draf uhel*, o herzel an holl dalmoù dindan ur gwehin lavaret.

filtre intraveineux cave, filtre ombrelle, filtre parapluie ◇ **endoveineux filter** ◇ **sil engwazhiennel, sil enkavel, sil dizenfraouer** Trevnad ebarzhet dre gateter er wazhienn gav, e sell da houbañ ar c'haouled o tont eus an izili hag, e se, da hepkoriñ an enfreier skevent.

Fisher : syndrome de ~ ◇ **Fisher's syndrom** ◇ **azoniad Fisher** Azoniad o kevrediñ kammeraezioù, un andamoug hollel, un ankedre ilpennel, ul lagadseizi diavaez hag un disklot kelligalbuminel el liñvenn benn-kein; an azoniad-mañ, o tinodiñ trumm hag o steuziañ gorrek, a intenter evel ur seurtad liesgwriennfo.

fissuraire ◇ **fissural** ◇ **1 skarrek aa. 2 skarrennek aa. 3 skarrel aa., 4 skarrennel aa.** 1 Gantañ ur skarr pe skarrou. 2 Gantañ ur skarrenn (fraezh). 3 A-zave da skarrou. 4 A-zave d'ur skarrenn (fraezh), sk. : *an azoniad skarrennel*.

1 fissure 2 fissure anale 3 fissure ◇ **1 fissure 2 anal fissure 3 cleft** ◇ **1 skarr g. 2 skarrenn b. (fraezh) 3 skarr** 1 Anaf e rezh ur faout, er c'hroc'hen peurliesañ, da skouer ar *spinac'henn* (Gl. *crevasse*). 2 Gouliez hirvoan a-c'horre, laurus bras peurliesañ, sezet e plegoù saezhennus ar fraezh. 3 Kammneuziad e rezh ur faout etre daou barzh neuziadurel a vez soutet ent vonan, da skouer *skarr an dremm* (Gl. *fissure faciale*, Sz. *facial cleft*); *skarr al livenn* (Gl. *fissure spinale*, *fissure du rachis*, Sz. *cleft spine*) (sl. *bec-de-lièvre*, *dysraphie*, *spina bifida*).

fissur-

• *cheilite fissuraire* gweuzfo skarrek • *épaississement, rétraction, atrophie, fissuration de la peau* tevadur, argrizadur, anteñvadur, skarradur ar c'hroc'hen • *érosion fissurale d'une ou des deux commissures* graspad skarrek en un pe en daou freilh • *kératose palmaire, épaisse, fissurée, douloureuse* keratoz ar palvoù, tev, skarrek, laurus • *la couche épitrichiale se fissurant dans les heures qui suivent la naissance* ar gwiskad epitrikel o skarrañ en eurvezhioù goude ar c'hanedigezh.

fistulaire : bruit ~ ◇ **water-whistle sound** ◇ **trouz bourbouilh** Trouz trumm evel hini ur bomm dour, klevet d'ar selaouennañ, ezerc'h hadenn ur bruskdouaezhad pe ur brusklinaezhad kehent gant ur vronkezenn.

fistule ◇ **fistula** ◇ **fic'h g. -ioù** Treugad ezreol, ganedigel pe arzeuat, anaezien, daraezel pe surjanel, ma tiver ul liñvenn vonan pe gleñvedel; *fic'h born diabarzh* (Gl. *fistule borgne interne*), *fic'h dezhañ un digor hepken*, er youlc'h; *fic'h born diavaez* (Gl. *fistule borgne externe*), *fic'h dezhañ un digor hepken*, e ribl ar fraezh; *fic'h brenkel* (Gl. *fistule branchiale*), *fic'h dre baouez organbarañ ar benvegad brenkel*, sezet en dremm pe er gouzoug; *fic'h daeraouel* (Gl. *fistule lacrymale*), *fic'h diwar un daraez*, bet anafet gantañ gwagrenn pe kanoligoù an daeroù; *fic'h fraezhel* (Gl. *fistule anale*), treugad direoliek o vont eus glaourenn ar youlc'h da ribl ar fraezh, kehent gant kavenn ur pugnez tro-fraezh; *fic'h kreuzel* (Gl. *fistule gastrique*), treugad strizh, emdarzh, daraezel pe surjanel, o kehentaat kavenn ar stomok hag ur flugezenn gefin pe ar c'hroc'hen; *fic'h oulennel* (Gl. *fistule stercorale* pe *stercoraire*), *fic'h daraezel*, emdarzh pe surjanel o kehentaat a 'r pervez gant ur gavenn naturel pe gant ar c'hroc'hen, o lezel da dremen ur c'hementad bihan oulennoù; *fic'h talmerenn-gwazienn* (Gl. *fistule artérioveineuse*), kenster da *darvold talmerenn-gwazienn* (sl. *anévrisme artérioveineux*); *fic'h yunegenn-kolon* (Gl. *fistule jéjunocolique*), treloezad un angreizh a 'n daouzegenn pe un angreizh peptek a 'r c'hilbleg ezkasat goude un dasforzhañ kreuz-pervez, o tigeriñ un treugad a zifourk er c'holon (sl. *cæcostomie*, *anus artificiel*, *anus contre nature*, *iléostomie*).

fistuloduodenostomie ◇ **fistuloduodenostomy** ◇ **dasforzhañ fic'h-daouzegenn** Skarvañ surjanel ur fic'h bestlel pe ilgreizel ouzh an daouzegenn.

fistulogastrostomie ◇ **fistulogastrostomy** ◇ **dasforzhañ fic'h-kreuz** Skarvañ surjanel ur fic'h bestlel pe ilgreizel ouzh ar c'hreuz.

fistulographie ◇ **fistulography** ◇ **fic'h luniñ** Skinluniñ treugad ur fic'h bet ensinklet ennañ un aozad Xdemer.

fixateur externe ◇ **external fixation** ◇ **fester g. diavaez, festadur g. diavaez** Stignadell gesteudañ anezhi barrennoù diavaez o kevrediñ garennoù metal siket en tammoù eus un askorn torret evit o derc'hel diloc'hek.

fixation ¹ ◇ **fixation** ◇ **glenad g., glenañ** (Bredelfennerezh) Hervez tri diarsell e komzer eus glenañ : 1) pa chomer emstaget start ouzh an un ergerc'henn, 2) pa chomer luget en ur mod boziañ, 3) pa na zistremener ket ur bazenn eus emdroadur ar bred.

fixation ² ◇ **fixation** ◇ **festañ** Arwerc'hañ danvez un imbourc'hadenn wiadoniel e sell d'he mirout kuit a zistresadur.

fixation du complément, déviation du complément ◇ **fixation of the complement** ◇ **lenañ ar glokaenn, dastrann ar glokaenn** Pa azdoder gwadveiz fresk d'ur meskad a zo ennañ un antigen hag ur c'hizidikaer (antikorf), ez a ar glokaenn bezant er gwadveiz da lenañ ouzh an antigen hag e steuz diouzh ar meskad (gant ma ve ar c'hizidikaer an hini o klotañ gant an antigen); evit gwiriañ ha peurlenet eo ar glokaenn, ez azdoder ouzh ar meskad ul livrizhad hemati dañvad hag ur gwadveiz antidañvad bet tommet da 56°C, ennañ enta ar c'hizidikaer hep klokaenn; mard eo bet peurlenet ar glokaenn bezant er gwadveiz azdodet d'ar meskad kentañ, ned eo mui evit dileizhañ hemati an dañvad, ne c'hoarvez ket ar gwadlloezañ hag ar meskad ned a ket ruz; lavarout a reer neuze ez eo bet *dastrannet ar glokaenn* hag ez eo yaek an dazgwered; nac'hek e vez pa n'eo ket bet lenet ar glokaenn, eleze pa n'eus ket antigen er meskad ha pa c'hoarvez ar gwadlloezañ; an anadenn-se a gevaraez diskoulmañ div gudenn : 1) bezet un antigen, gouzout ha bezant eo ar c'hizidikaer keñverek en ul liñvenn (dazgwered Bordet ha Gengou, 1901); 2) bezet ur c'hizidikaer, gouzout ha bezant eo an antigen keñverek (sl. *anticoimplémentaire*, *complément*, *com-plexe immun*, *sensibilisatrice*).

fixation oculaire ◇ **ocular fixation** ◇ **steudañ lagad** Anadenn skiantennel ha loc'hadel oc'h ober d'al lagad durc'haat etreze (steudañ diouzh) un ergorenn, eleze d'ar gwelabel dibennañ er poent a denn an evezh; ent reol emañ ar gwelabel pennet er rioul greiz, ent ezreol en ur poent all eus al luc'hsae — anv a reer neuze a *steudañ ezkreizek*.

fixation spasmodique du regard ◇ **syndrome de ~** ◇ **psychic paralysis of visual fixation syndrome** ◇ **azoniad ar steudañ kantlenadek** Dic'halloud da zistagañ ar sell diouzh un ergorenn; pa loc'h an ergorenn ez a ar sell da heul, ouzh he c'hantlenañ diarzoug; paouez a ra sujidgezh ar steudañ pa serr ar gouziviad e zaoulagad pe pa etrelakaer ur skramm; kiriek d'an direizh eo anafoù e tolbezenn an tal (sl. *Balint : syndrome de ~*).

fix-

• *abcès de fixation* gor delenañ, pugnez delenañ • *anticorps se fixant à la surface de son antigène* antikorf o lenañ ouzh gorre e antigen • *axe de fixation* : droite passant par le point fixé et le centre de rotation du globe oculaire ahel studañ : eunenn oc'h eren ar poent stedeut dioutañ ha kreiz c'hwelañ ar voull lagad • *bague destinée à fixer un appareillage orthodontique* envez o talvoud da Aanlenañ ur steudell denteeunañ • *cæcofixation, cæcoplexie* Aanlenañ sac'henn, sac'hennAanlenañ • *cellule fixe* kellig diloc'h • *colorant se fixant sur les protéines* livuzenn o lenañ ouzh ar proteinoù • *colpopexie* : fixation chirurgicale du vagin gouinAanlenañ : festañ surjanel ar gouin • *enseignement spécial fixé par arrêté ministériel* kelennadur arbennik devredet dre ziferad maodiern • *fixation de l'histamine par certaines substances* dezerc'hel an histamin gant danvezennou 'zo • *fixation des bactéries par certaines cellules* pakidigezh ar bakteri gant kelligoù 'zo • *fixation et accumulation de l'or dans les tissus* lenañ ha yoc'hañ an aour e-barzh ar gwiadoù • *fixation thyroïdienne de l'iode radioactif* delenadur an iod skinoberiek gant ar skoedenn • *fixer les deux maxillaires en position d'occlusion* sonnañ an div aven el lakadur kehaz • *le fixisme est la théorie affirmant que les espèces vivantes sont restées inchangées* ar festedouriezh eo an doazhadur o haerñ eo chomet digemm ar spesadoù bevion • *fonctions et titres fixés par le règlement* kargoù ha titloù erverket gant ar reoliadur • *greffon osseux fixé par des vis* imboudenn askorn festet dre viñsoù • *le complément va se fixer sur l'antigène* ez a ar glokaenn da lenañ ouzh an antigen • *nodule fixant électivement un radio-isotope* nozelenn o telenañ a-ziuz ur skinizotop • *ordre de vers dont l'extrémité antérieure possède des organes de fixation* urzhad preñved gant organoù spegañ en o fenn araok • *portion initiale, fixe, de l'intestin grêle* lodenn deroù, fest, ar vouzellenn voan • *prothèse fixée sur les dents* osod anlenet ouzh an dent • *substance rapidement fixée par l'hépatocyte* danvezenn delenet buan gant an avugellig • *substances chimiques, microbes, virus qui se fixent sur la peau* danvezennou kimiek, garvevion, viruzoù o lenañ ouzh ar c'hroc'hen • *substances qui se fixent d'une façon élective sur les bactéries* danvezennou o lenañ ent hanbarek ouzh ar bakteri.

flaccidité ◇ **flaccidity** ◇ **1 gwakvez b. 2 ankevod g.** 1 Diouer started, bloted un danvez, ur gwiad. 2 Ent dibarek, diouer reuter un organ sonnidik (sl. *dysfonction érectile, érection*).

flagellation ◇ **flagellation** ◇ **1 biziata 2 skourjezañ** 1 Kalvezder leuñviñ, seurtad stokata, anezhañ skeiñ lerc'h ouzh lerc'h ar biziad gant ar parzh a venner merata. 2 Foetañ gant ur skourjez pe nep lerenn heñvel war-benn kastizañ pe evel pleustr orgedel.

flagellés ◇ **flagellata** ◇ **flagelleged l. (g.)** “protozoed outo un pe lies skourjezig hag a-wechoù ul lienenn neuennus o talvoud dezho da benvegad dilec'hiañ” (E. Brumpt); un niver anezho zo arvevaded ouzh an den : *Leishmania, Trypanosoma, Trichomonas*, h.a.

flanc ◇ **side** ◇ **stlez g., -ioù, d. daoustlez** Pep hini eus daou rannbarzh ar c'hof etre ar falskostoù hag ar c'hribennoù klun, etrezo rannbarzh ar begel.

flasque

• *démarche en draguant, démarche helcopode, constatée dans l'hémiplégie flasque* argenk ravanellus stadet el ledseizi gwak • *hémiplegie flasque, puis spasmodique, siègeant du côté opposé à la lésion* ledseizi a-eiltu gwak da gentañ, neuze dasstrizhek • *paralyse flasque, c'est-à-dire caractérisée par l'hypotonie musculaire* seizi gwak, eleze naouus dre an istant kaherel.

flatulence ◇ **flatulence** ◇ **gwentezh b.** Dedaolad aezhennoù o tec'han gloen er c'hreuz hag er pervez kevret alies gant leuskel aezhennoù dre ar genoù hag ar fraezh (sl. *dyspepsie*).

flexibilité cireuse ◇ **flexibilitas cerea, waxy rigidity** ◇ **gweüsted b. koarek** Anglevad koar blot roet gant izili gouzviaded 'zo pa glasker o deloc'hañ ha tuadur ar rannoù ezel da venel en emstummoù lakaet dezho (sl. *catalepsie*).

flexion ◇ **flexion** ◇ **plegañ** Leiaat ar c'horn luniet gant div rann eus un ezel.

flex-

• *antéflexion, latéoflexion, rétroflexion de l'utérus* rakplegad, tublegad, drekplegad ar grozh • *augmenter la flexion du fœtus in utero* muiaat plegadur ar grouell er grozh • *conduit flexueux* kanol droielliek • *tube mince et flexible* korzenn voan ha gweüs • *variété de cartilage dont la flexibilité est liée à la richesse de sa matrice en fibres élastiques* seurtad migorn a zo e weüsted a-geñver gant paotet ar gwiennou dastennek e-barzh e bleuskenn.

Flint : roulement ou signe de ~ ◇ **Flint's murmur** ◇ **fraoñv g. Flint** Fraoñv raksistolel klevet ouzh kern ar galon er skorted aortek hep isvoll mintrek.

floculation ◇ **flocculation** ◇ **malzenniñ** Kaouledañ un dileizhenn golloidel tanavet e rezh malzennoù o c'houzediñ, anadenn a gorvoer e rezh *dazgweredoù malzenniñ* (Gl. *réaction de flocculation*) evit deznaouiñ kleñvedoù 'zo : sifiliz (d. m. Kahn, Kline, Meinicke, Vernes gwezhet war ar gwad, d. m. benzo kolloidel, d. m. Targowla war al liñvenn benn-kein), paludegezh, torzhellegezh, h.a. — dispredet eo ul lod mat eus an dazgweredoù-se; hiziv ez arverer ar malzenniñ en hangaeoniezh dreist holl, da geñver dazgweredoù antigen-antikorf ma tinod dazadoù andileizh (hangaeouledañ), evit dezventañ an antitoksinou (sl. *bentonite*).

floculus glomérulaire ◇ **glomerular flocculus** ◇ **toupenn b. ar bloueig** Goustellad korrwazhied e-barzh ar bloueig lounezh.

flora intestinale ◇ **intestinal flora** ◇ **garveveg b. -i pervez** Kevredad spesadoù bakteri kemmagat o trigañ er pervez.

Flosdorf : test de ~ ◇ **Flosdorf's test** ◇ **prouad Flosdorf** Diwar ensinkladur entonennel 0,1 mL aglutinogen douhennet eus bazhell Bordet ha Gengou e tarvez, dindan 24 h, ur grugenn 1 cm led gant ar c'houzviaded graet ganto an drev pe bet vaksinet outañ; nac'hek eo ar prouad gant ar c'houzviaded tizhadus.

flot : bruit de ~ ◇ **succussion sound** ◇ **trouz saflik** Flokign a c'hoarvez pa c'houlanker hejadennou ouzh ur gavenn oc'h enderc'hel liñvenn hag aezhenn (bruskdouraezhad, kreuzusvoll).

flot : sensation de ~, signe du ~ ◇ **fluid thrill, fluid wave** ◇ **arouez b. ar c'houmm** Azon torliñv : gant an dorn harp ouzh an eil stlez e verzher ar c'hiziata graet ouzh egile.

fluctuation ◇ **fluctuation** ◇ **kefliñvañ** Azon un hogennad liñvel : pouezañ war ur poent a ra da boentoù all sevel.

fluor ◇ **fluorine** ◇ **fluor g.** Elfenn gimiek eus kerentiad an halogenoù, arouez F, niverenn atom 9, tolz mol 19, lenidik ouzh ar gwiaoù askorn, danvezet en Dentouriezh evit ergurañ ar bruk ; e skinizotop 18 a arverer evit skingannluniñ an eskern.

fluorescence ◇ **fluorescence** ◇ **kendreluc'hañ** Luc'hec'hodiñ diwar an diargridañ emdarzh eus molekul bet argridet gant ur skinañ entreatu tredanwarellel pe rannigel ionaus.

fluorométrie, fluoroscopie ◇ **fluorometry** ◇ **kendreluc'hselliñ, fluoroskopiñ** Arver ar c'hendreluc'hañ evit imboure'hiñ gwiaoù, organoù pe arc'hwelioù, da skouer ensellout an amwiskadoù aet kendreluc'h dre wered ar skinoù dreistmouk (sl. **cyto-fluorométrie**).

fluorophotométrie ◇ **fluorophotometry** ◇ **kendreluc'hventañ** Hentenn studi kementadel gwiaoù al lagad dre kendreluc'hañ.

fluorose ◇ **fluoric cachexia, fluorosis** ◇ **fluoroz g., fallezh b. fluorel** Pistriadur greantel ha bouedel (nn. 32 war daolenn ar c'hleñvedoù micherel) o tizhout an dud hag ar chatal e kefin ar greantioù o tilaoskiñ uzc'hwezhoù fluorek (aozerezhioù aluminiom), naous dre reuted ar c'higennoù, breskted an eskern ha seizioù o tedreiñ d'ar marv.

(-)**flu-**

• **affluent** adwaazhienn • **affluer** strummañ • **angiofluoroscopie** angiofluoroskopiñ • **arthrifiant** 1 arzloezus 2 arzien • **canal formé par la confluence du canal déférent et de la vésicule séminale** kanol diwar gember ar san sper hag ar gellenn sper • **déplacement irrégulier et incessant des particules en suspension dans un fluide morloc'h** dizurzh ha diastal an eurl en arc'hoal ebarzh un heverenn • **diffluent** 1 liñvennek 2 amberus • **fluidité** berusted • **fluorescéine** fluoreskein • **nodules qui confluent** ozvennoù o taskantañ • **influence, influencer** delanvad, delanvadiñ • **ossifiant** 1 askornloezus 2 askornien • **symptomatologie fluctuante** azoniadur neuennus • **volume des fluides corporels dans lesquels l'ion brome se répartit uniformément** ec'honenn liñvennoù ar bevedig ma skign unvan an ion brom.

flush ◇ **flush** ◇ **gwrid g.** Barr ruzder e kroc'hen an dremm dreist holl o tarvezout e kleñvedoù 'zo (karkinoïd ar pervez) pe goude euvriñ danvezenoù evel an alkool, an trinitrin pe an disulfiram ; un dilaosk prostaglandineier e ve ar wikefre anezhañ (sl. **Björk** : **syndrome de ~, bouffée de chaleur**).

flutter ◇ **flutter** ◇ **gougren g.** Strafulilh eus korvez ar galon naous dre ul lerc'hiad argrezadoù herrek kenheuilh hep paouez etrezo, o tizhout ar c'hentezoù peurliesañ : diforc'hiñ a reer ar **gougren kentezel**, gant ur gorvez 300 lamm/min er c'hentezioù hag ur gorvez 150 lamm/min er c'hofigoù hag ar **gougren kofigel**, anezhañ ur gorvez ouzhpenn 200 lamm/min gant ur barrwezd distreset bras.

fluttering ◇ **fluttering** ◇ **flapell b., flapellañ** Azon kalonstenerluniñ stadet er skorted aortek, anezhañ ur froumad dibarek eus ar sac'hell vintrek vras (sl. **Flint** : **roulement pe signe de ~**).

flux génétique ◇ **genetic flow** ◇ **lanvad g. hilel, hillanvad g.** Teskad an doarenoù hêrezhel piaouel d'ur boblañs en ervez da zedreiñ en amzer hag en egor a-geñver gant an treuztiriañ hag ar meskañ.

flux plasmatique ◇ **plasma flow** ◇ **lanvad plasma** Kas dewerzh e mL/min eus plasma ar gwad o treuziñ un organ pe un tiriad lavaret ; **lanvad plasma gwerc'hek** (Gl. **flux plasmatique efficace, Sz. efficace plasma flow**) eo kas ar plasma o perzhiañ en arc'hwel spesadel an organ, da skouer, lanvad plasma gwerc'hek al lounezh eo an hini a zegouezh en nefron, o perzhiañ en aozadur an troazh (e-tro 90 % eus al lanvad hollel).

flux sanguin ◇ **blood flow** ◇ **lanvad gwad** Kas dewerzh e mL/min eus ar gwad o treuziñ un organ pe un tiriad lavaret, da skouer, al **lanvad gwad lounezhel** (Gl. **flux sanguin rénal, Sz. renal blood flow**) reol, etre 1 000 ha 1 200 mL/min, par da 20 % eus ec'hongas ar galon.

fluxion, congestion active ◇ **fluxionary hyperaemia, fluxion** ◇ **darwazh g. oberiat** Tanijenn lemm gant gourwad (sl. **congestion**).

NOTENN : Gl. **fluxion** a denner da averañ hepken er c'herienn **fluxion dentaire**, koeñvadur foel gwiaed kellaouek ar jod hag ar vunsun diwar un danienn dent.

(-)**flux(-)**

• **afflux** strumm, strummad • **flux d'induction électrostatique** douenlanvad • **flux d'induction magnétique** derenlanvad • **flux de force** lanvad nerzh • **flux énergétique** gremmgas • **flux lumineux** luc'hgas • **fluxmètre, débitmètre** lanvadventer, kasventer.

focal(-)

• **bloc focal du ventricule gauche causé par un infarctus** tolc'had annonek ar c'hofig kleiz dec'hanet gant un angwaziad • **distance focale** stihed • **épilepsie focale** droukfell annonek • **éclairage intense et focalisé** gouloù kreñv ha stiet • **focaliser, focalisation** stiañ, destiañ • **lésion cérébrale focalisée** annon anafel an empenn.

foehn : **maladie du ~** ◇ **föhn ill, föhn illness** ◇ **kleñved ar feun** Teskad strafuilhoù stadet e Tyrol hag e Helvetia pa c'hwezher ar feun, avel sec'h ha tomm : nervernegezh, rastrid, anhun, skuizhnez, enkrezh ha diwaskadur, direizhoù koazhadel, दौरisvec'h gant ar magadelled.

- foetal** ◇ **fetal** ◇ **1 krouellek** aa. **2 krouellel** aa. 1 A neuz gant organoù ar grouell pe an anadennoù stadet enni, sk. : *stad krouellek ar skevent*. 2 A-zave d'ar grouell, sk. : *orin krouellel ur yoc'henn*.
- foeticide** ◇ **feticide** ◇ **krouellazh** g., **krouellazhañ** Andisha ur grouell.
- foetographie** ◇ **fetography** ◇ **krouelluniañ** Skinluniñ ar grouell *in utero*.
- foetologie** ◇ **fetology** ◇ **krouelloniezh** b. Studi diorren ar grouell.
- foetopathie** ◇ **fetopathy** ◇ **krouellanaez** g., **krouellnaoued** g. Anvad rumm an tizhadoù anhilel (pistriel, foel pe negezel) o tireizhañ diorreadur ar bec'hiegad e-kerz ar grouellvezh (adalek ar pevare miz) (sl. *conceptus, embryopathie*).
- foetopathie alcoolique** ◇ **alcoholic fetopathy** ◇ **krouellnaoued alkoolel** Dilerc'hegezh diorren (korregezh) gant bugale diwar mammoù o c'houzañv alkoolegezh henek.
- foetor hepaticus** ◇ **fetor hepaticus** ◇ **flaer** g. **avuel** C'hwezh dibarek an anal (avaloù brein) gant gouziviaded an empennaoued avuien.
- foetoscopie** ◇ **fetoscopy** ◇ **krouellwerañ**, **krouellengweliñ** Luc'hwereañ trewan gwezhiet e-tro trede mizvezh ar vrazedded dre sankañ adreuz speur ar c'hof un endoskop e-barzh kavenn ar vi; erc'hwiliadur o kevaraezañ erlamadoù gwad ha gwiadoù diwar ar grouell pe an adparzhioù anezhi.
- foetus** ◇ **fetus** ◇ **krouell** b. Bevedeg dedaolad an engehentañ goude trede mizvezh ar vec'hieg.
- foetus araignée** ◇ **spider fetus** ◇ **krouell gevnidenn** Krouell isteñvek, a vent reol, skoanet avat e wiadoù behinel ha kahelel, heñvel ouzh ur falc'heg, da heul skorted arc'hwelel an dorzhienn.
- foetus compressus**, **foetus pain d'épice**, **fetus papyraceus** ◇ **fetus compressus**, **fetus papyraceus** ◇ **krouell bar-chek** Anvad roet d'an eil gevell unkadoanek dilañset e goundigile gant un amred etre torzhienn ha krouelloù dizingal ha marvet kent ar 5^t mizvezh.
- foetus vopiscus** ◇ **single viable fetus**, **vopiscus** ◇ **ungevell bevus**, **vopiskuz** g. An hini eus an daou c'hevell unviel bet diorreet diwar goust egile ha ganet bev.
- foie** ◇ **liver** ◇ **avu** g. Gwagrenn ec'honekañ eus ar bevedeg, loet er c'hougestadenn dehou, ezvorc'hat hag enborc'hat, kehent gant ar gorzenn vezhur, o vorc'hañ ar vestl hag o tasperzhiañ e kennevidoù niverus.
- foie alcoolique** ◇ **alcoholic liver** ◇ **avu alkoolek** Avuad o kevredañ tri rezh anafoù devoudet gant an alkoolegezh henek : *a) ar steatoz*, gant ensiladur druzennoù er parenkim, kentrat hag eiltroüs; *b) an avufo alkoolel*, gant ensiladur kelligoù lieskroañellek ha gloevennadur an avugelligoù, enno ebarzhennoù bras trenkenlen, korfoù Mallory, tizhadur ampellat o t dreññ a-frapadoù hag o lezel arlenadoù e rezh fibroz; *c) ar c'hirroze*, o c'hoarvezout goude ur pistriadur hirbad (sl. *cirrhose*).
- foie cardiaque** ◇ **cardiac liver** ◇ **avu kalonien** Darwaziadur an avu dre gildassav diwar skorted kalon; pa vez an avu o koeñvin-digoeñvin hervez ma wash pe ma wella stad ar galon e reer anv eus *avu akordeoñs* (Gl. *foie accordéon*, Hanot); pa vez koeñvadurioù an avu a-gellusk gant lammoù ar galon, azon ar skorted ttriboudek, e komzer eus *avu talmus* (Gl. *foie systolique*).
- folate** ◇ **folate** ◇ **folat** g. Hal an drenkenn folek; diziouer eus eo ar folatou da enaoz an DNA.
- folie** ◇ **insanity** ◇ **follezh** b. Termen arveret c'hoazh a-wechoù evel kedrann e geriennoù bet luniet gant gwastadourion ar vredvezekniezh : *folie à double phase*, *folie circulaire*, *folie périodique* (sl. *cyclothymie*), *folie discordante* (sl. *schizophrénie*), *folie raisonnante* (sl. *paranoïa*), h.a.
- folique** : **acide** ~, **vitamine B₉** ◇ **folic acid** ◇ **trenkenn folek**, **vitamin B₉** Danvezenn gemplezh eus stroll ar vitaminoù B, enebamwaded gallowdus, bezant en douhennadoù avu, er govevion, er pinochez (sl. *antifolique, folate*).
- follicle** ◇ **folliclis** ◇ **follikliz** g. Seurtad torzhellegezh a 'r c'hroc'hen, naouus dre un dispuilhad krugennoù ensilet, kalet, ruz, warno ur c'hwezigen vihan toull, o sezañ war an izili hag o t dreññ gorrek d'ar pare en ur lezel ur gleizenn bukadek.
- follicule** ◇ **follicle** ◇ **bolc'henn** b. & u. Elfenn neuziadurel vihan bonan pe gleñvedel dezhi neuz ur sac'h.
- follicule de De Graaf**, **follicule ovarique mûr**, **follicule mature** ◇ **mature follicle** ◇ **bolc'henn vierez azv**, **bolc'henn De Graaf** Bolc'henn vierez e dibenn he azvedigezh kent leuskel ar vigellig dre fregañ d'ar 14^t deiz (sl. *corps jaune, ovulation*).
- follicule lymphoïde** ◇ **lymph follicle** ◇ **bolc'henn limfoïdel** Furmadur limfoïdel elfennel, ouzh e ober ul lodenn greiz pe greizenn eginek hag ur gurunenn kelligoù limfoïdel pe mantell; kemm a lakaer etre ar *b. l. kentaal* hag ar *b. l. eilvedel*, ar re-mañ oberiat o c'hreizenn eginek ha dasperzhiat en erwezhañ hangaelel, e danzen an antikorfoù pergen.
- follicule pileux** ◇ **hair follicle** ◇ **bolc'henn ar blev**, **bolc'henn vlevel** Furmadur ouzh e ober ar vlevelenn, ar gwagrennoù hag ar c'higennoù kevreet ganti.
- follicule pilosébacé** ◇ **pilosebaceous follicle** ◇ **bolc'henn vlevelsoavel** Unvez neuziadurel o c'hoarvezout eus ar vlevelenn, ar goloioù anezhi hag ar wagrenn soav o tifourkañ er ganol volc'hennel.
- follicule tuberculeux** ◇ **tubercle** ◇ **torzhell** b. **elfennel**, **bolc'henn dorzhellek** Anaf elfennel, diwar erwez ar gwiadoù ouzh bazhell Koch, ouzh e ober tri zachad kengreiz : ur gurunenn limfokit en dro d'un tolpad kelligoù epitelioidel hag ur greizenn graet gant keurgelligoù Langhans.
- folliculite** ◇ **folliculitis** ◇ **bolc'hennfo** g. Anvad rumm tanijennoù ar bolc'hennoù : *a) bolc'hennfo blevel* (Gl. *adéno-trichie, folliculite*); *b) bolc'hennfo pervezel* (Gl. *folliculite abdominale*), tanijen ar bolc'hennoù pervez, a vez poent loc'hañ an divil-

hennfo; c) *bolc'hennfo moalau* (Gl. *folliculite décalvante, pelade, alopecie en plaques*), *bolc'hennfo* ar brigenn o tevoudañ an diwaoutad kantet (sl. *alopé-cie en aires*).

folliculome ◇ **folliculoma** ◇ **follikulom** g. Nevezwe heñvel e neuz hollek hag e gelligoù ouzh re *bolc'henn* De Graaf, o tec'han daskemmoù korfel dre berzh an usvorc'h hormonoù revel benevel.

follicul-

• *amas de follicules lymphoïdes clos* tolpad *bolc'henn*où limfoidel kloz • *cellules parafolliculaires de la glande thyroïde* kelligoù lez-*bolc'h* ar skoedenn • *conjoncti-vite folliculaire (avec formation de follicules)* kevresaefo *bolc'henn*ek • *entérite folliculaire (affectant les follicules)* pervezfo *bolc'henn*el • *thèques folliculaires* toagoù ar *bolc'h*.

fonction ventriculaire ◇ **ventricular function** ◇ **arc'hwel kofigel** Gweredrezh kaher ar c'hofigoù a studier hervez daou ziarsell : an *arc'hwel kigenn* (Gl. *fonction muscle*), denaouet e termenou a nerzh hag a vuanez argrezañ, an *arc'hwel plomenn* (Gl. *fonction "pompe"*), denaouet e termenou a wask, a gas hag a labour.

fonction ◇ **functional** ◇ **1 arc'hwelek** aa. **2 arc'hwelel** aa. 1 En araez da arc'hwelel pe da gemer perzh en an arc'hwel, sk. : *hemoglobine arc'hwelek*. 2 A-zave d'un arc'hwel; *strafuilh arc'hwelel* a reer eus un erzerc'had ezreol, kuñv hag eiltroüs peurliesañ, diwar un direizh e gweredrezh un organ hep anaf dinoadus; a-gevenep e reer anv a *strafuilh organel* pa anataer un darallad neuziadurel (sl. *anorganique, organique*).

fonction-

• *aide fonctionnelle* harp arc'hwelel • *chef de clinique sans fonction hospitalière* penn klinik hep karg ospital • *dysfonction, dysfonctionnement* miarc'hwel • *élaboration d'une enzyme en fonction de la composition du milieu* danzeadur un enzim diouzh kenaoz ar metoù • *enzyme dont la biosynthèse est fonction des besoins de l'organisme* enzim a zo e vevenaoz e diazalc'h ezhommoù ar bevedeg • *épreuve fonctionnelle* proud arc'hwelel • *fonctionnement conjugué* kedarc'hwelerezh • *la fonction -CH₂OH* ar soaz -CH₂OH • *les protéines se déplacent dans le champ électrique à des vitesses qui sont fonction de la taille, la forme et la charge électrique de leurs molécules* ar proteinoù a ziloc'h en tredanvaez gant tizhoù kevreizh da vent, da stumm ha da dredanvec'hiad o molekul • *molécules possédant une fonction acide et une fonction amine* molekul outo ur soaz trenkenn hag ur soaz amin • *valeur fonctionnelle* arc'hwelegez.

fond d'œil ◇ **optic fundus** ◇ **deun g. al lagad** Gwel al luc'hsae arsellet dre an oftalmoskop.

fond-

• *au fond des alvéoles dentaires* e deun al logigoù dent • *bruit de fond* vorm • *bas-fond vésical* goueled ar c'hwezhi-gell • *couleur fondamentale* liv diazez • *crises de vaso-dilatation au niveau du visage évoluant sur un fond de cyanose permanente* barradoù gwazhiedfrankadel en dremm o tedeiñ war goueled un dulaz padek • *électrophysiologie fondamentale* tredanvevedouriezh vonel • *enseigner les sciences fondamentales* kelenn ar skiantoù diazez • *fond d'anxiété* goueled enkreuz • *formation se développant au fond d'une plaie* furmadur o tinodiñ e deun ur gouli • *hypotonie de fond* istant goueled • *la tension fondamentale qui sous-tend l'humeur* an tennder boniek o c'houstennañ an noa • *luminance du fond* sked ar goueled • *sans fonde-ment, infondé* disol • *se fonder sur sa propre idée* soliañ war ar mennoz an unan • *surélévements phlycténulaires sur un fond rouge et œdémateux* tosennoù filboc'hennek war ur goueled ruz ha gouliñvek • *tissu conjonctif dont les cellules et les fibres sont emprisonnées dans une substance fondamentale solide* gwad kenglenel a zo e gelligoù hag e wiennoù paket e-barzh ur vondanvezenn sonnel.

fongémie ◇ **fungaemia** ◇ **gwadfoueegez** b. Bezañs foue er gwad.

fongicide ◇ **fungicidal** ◇ **1 fouelazh** aa. **2 fouelazher** g. -ioù 1 Gant ar perzh lazhañ ar foue. 2 Danvezenn fouelazh (sl. *bactéricide, antifungique, fungistatique*).

fongiforme ◇ **fungiform** ◇ **kabellek** aa. O tennañ d'ur c'habell touseg dre e neuz pe dre e wiadezh (en dro-mañ diwezhañ e lavarar kentoc'h *fouevanek*, Gl. *fungueux*).

fongique ◇ **fungal** ◇ **1 foueek** aa. **2 foueel** aa. 1 A natur gant ar foue, tizhet gant ar foue. 2 A-zave d'ar foue.

fongistatique ◇ **fungistatic** ◇ **1 foueharz** aa. **2 foueharzer** g. -ioù 1 O virout ouzh ar foue a greskiñ hag a neriñ. 2 Danvezenn foueharz, perzh piaouet gant bevastalerioù 'zo (sl. *bactériostatique, antifungique, fungicide*).

fongoïde ◇ **fungoid** ◇ **fongoidel** aa. Heñvel a neuz ouzh ur mikoz (sl. *mycosis fongoïde*).

fongosité ◇ **fungosity** ◇ **fouevan** g. Struzhenn o tispakañ diwar gorre ur gouli, ur glaourgenn pe e-barzh ur gavenn natur, dezhi neuz un dolzenn vlot, puzuilh ha gwazhiedek kenan, diseurt he natur, peurliesañ torzhellek pe kankrel.

fongus ◇ **fungus** ◇ **fonguz** g. -ioù Termen a denner da zilezel, anvad a lakaed war yoc'hennoù a neuz gant ur foueenn, sk. : *fongus hématode*, sl. *angiome caverneux*.

Fontan : **opération de ~** ◇ **Fontan's procedure** ◇ **oberatadenn Fontan** Gwez surjanel evit kevassav un trapig tribroudek anvollek, anezhañ serrañ ar c'hehented etre-kentezoù ha dasforzhañ ar c'hentez dehou ha kef ar skevent dre araez ur gorzenn drapigek.

fontanelle ◇ **fontanelle** ◇ **feunteunig** b. -où Tachenn liennek etre eskern ar c'hloppenn gant an nevezc'hanidi.

foramen obturé ◇ **obturateur foramen** ◇ **toull steviet** Igorenn vras en askorn al lez etre an eskern kaezour ha koaez.

forc-

• *alimentation forcée* boueta dre redi • *champ de forces* nerzhvaez • *cœur forcé* kalon drastennet • *dilatation forcée* frankaat a-

helc'h • *diminution de la force musculaire* isnerzh ar c'higennoù • *expiration forcée* ec'hanalad helc'h et • *fixation forcée* steudañ sujet • *force capillaire* nerzh silluskañ • *force linéique, tension superficielle* (MT^{-2}) nerzhder regel (MT^{-2}) • *force massique, intensité de champ* (LT^{-2}) nerzhder tolzel (LT^{-2}) • *inspiration forcée* enanalad helc'h et.

forceps ◇ **obstetrical forceps** ◇ **gevel** b. **amiegel** Arddivink amiegouriezh ouzh e ober daou skourr kenvelladus (al *loaiou*, Gl. *cuillers*) evit kregiñ e penn ar grouell hag e eztennañ pa vez ar vamm hag ar bugel en arvar dre c'horregezh ar gwilioud.

forcipressure ◇ **forcipressure** ◇ **gevelwaskañ** Gwadkaeañ da c'hortoz dewerc'h et dre stardañ etre javedoù ur c'hevel ur wazhiedenn emeur o paouez skejañ.

formication, fourmillement ◇ **formication** ◇ **kemenerion** l. Anglevad dibarek a geñverier ouzh ar merzhadur eus merion o redek war ar c'hroc'hen.

formol, formaldéhyde ◇ **formaldehyde** ◇ **formol** g., **formaldehyd** g. Aldehyd formek, dilester arveret evit dilouezañ hag evit festañ ar pezhioù korfadurel.

formulaire ◇ **formulary** ◇ **angevezheg** b. Destladur al liaoù eeun war un dro gant dastumad delunioù ar bonangev-ezhioù hag ul lod bras eus ar mestragevezhioù.

formule cellulaire ou **cytologique** ◇ ◇ **kelligrestrad** g. Kenfeur ketep ar seurtadoù kelligoù bezant en ul liñvenn vonan pe gleñvedel.

formule leucocytaire du sang, leucogramme ◇ **haemogram** ◇ **gwennrestrad** g. Niver al leukokit bezant en 1 mm^3 gwad ha kenfeur ketep ar seurtadoù anezho ; anv a reer eus *tuginadur ar gwennrestrad* (Gl. *inversion de la formule leucocytaire*) pa sav dregantad ar mononuklear dreist 40 % diwar goust dregantad ar granulokit.

(-)form-

• *acnéiforme* aknevanek • *arciforme* gwarenek • *asthmatiforme* asmaheñvel, asma-vanek • *base azotée de formule complexe* bazenn nitrojenek a zelun kemplezh • *biotransformation* bevdreuzfurmadur • *caliciforme* kalirek, kibek • *canal formé par la réunion des deux troncs* kanol o tisoç'h eus kember an daou gef • *caséiforme, caséieux* keuzheñvel • *cataleptiforme* darsonnvanek • *cavité formée par un ou plusieurs os* kavenn luniet gant un pe lies askorn • *cellule responsable de la formation des fibres collagènes* kellig o parañ ar gwiennoù kollagen • *cholériforme* koleravanek • *choréiforme* korevanek • *chyliforme* sugennek • *conforme à kempleg diouzh* • *concrétion pierreuse qui se forme dans un canal* fetisaenn vaenek o tiwanañ e-barzh ur ganol • *corymbiforme* kuchennadek • *costiforme* kostezennek • *cutéiforme* gennheñvel • *de conformation anormale* kammstummet • *de forme allongée* hirvoan • *de forme déprimée* pukadek • *de forme étoilée* steredennek • *déformation distummañ, disneuziañ, distresañ, gwariañ* • *déformation du corps des vertèbres* disneuziad korf ar mellennoù • *dentoformateur* dantparer • *dérivés utilisés sous forme de nitrate* deveradoù arveret e rezh nitrat • *en forme de chicane* hoskerec • *en forme de grappe* blokadek • *en (forme de) selle* dibrek • *falciforme* falzek • *filiforme* neudheñvel, neudennheñvel • *fongiforme* kabellek • *formant un angle aigu* begek • *formation conjonctive* furmadur kenglenel • *forme, conformation* neuziadur • *forme cristalline* strinkennegezh • *forme négative* ginustum • *former des adhérences* glennellañ • *former saillie* balirañ • *former un réseau* amparañ ur rouedad • *formule chimique* delun kimiek • *formule d'Arneith* luniard Arneith • *for- mule pharmaceutique* delun lia, delun liaerezh • *fusiforme* gwerzhidek • *herpéti-forme* erorvanek • *hydatiforme* hidatiform • *ichtyosiforme* iktiozvanek, iktioziform • *impossibilité de conformer les mouvements volontaires à un but* koll ar galloud da azasaat ar finval diarvenn diouzh ur pal • *impression digitiforme* troennlouc'had • *informer* stlennañ • *malformation* kammneuziad • *information* kelad, stlennad • *information génétique* hilstlennad • *informatiser* stlennekaat • *les ions formés par le passage des rayonnements* an ion ganet gant tremen ar skinadoù • *modifier la forme de l'astragale* adstummañ an askorn fer • *moliniforme* bolbosek • *morbilliforme* ruzellvanek • *néoformé* nevezfurmet • *néoplasme formé aux dépens des canalicules biliaires* nevezwe evodet diwar ar c'hanoligoù bestl • *os pisiforme* pizenneg • *performance* digonusted • *punctiforme* poentek • *reformer* adluniañ • *réniforme* favennek • *rubéoliforme* ruzigvanek • *sacciforme* sac'hek, bazhoulek • *scarlatini-forme* skarlegvanek • *se former, se développer (à partir de, aux dépens de)* evodiñ (diwar, diouzh) • *site de formation et de stockage du glycogène* load furmiñ ha boniañ ar glikogen • *sous forme de traces* a-louc'hadoù • *spongiforme* spouevanek • *synthétiser, former* enaozañ • *transformisme* treuzfurmadouriezh.

Förster : syndrome de ~, rigidité des artériosccléreux ◇ ◇ **azoniad Förster, reuter** g. **an arteriosklerozeion** Tizhad ar reizhiad ampikerennek a stader gant an dud oadet arterio-sklerozekek, naouus dre reuter ar c'higennoù, en izili traoñ dreist holl, diwar an ustant ha daraspad tantel an damougoù, gorregezh ar finval, an anveid ha kren an eizhaennoù (sl. *myosclérose rétractile des vieillards*).

fortuitisme ◇ **fortuitism** ◇ **1 ec'hoaregezh** b., **ec'hoaregouriezh** b. **2 diforzhegezh** b. 1 Doazhadur o lakaat ne spir ket ar savegezh da zisplegañ an devoudoù naturel hag e ranker lakaat an dargouezh e penn kont. 2 Tech gant bugale 'zo da respont n'eus forzh petra.

foulage ◇ **crushing** ◇ **mac'hellañ** Kalvezder leuñviñ, anezhañ mezañ tolzadoù bras a gigennoù.

foulure ◇ **sprain** ◇ **gwaskadenn** b. Gweadenn leiek hep difrapad ar stagelloù (sl. *entorse*).

fovea ◇ **fovea** ◇ **rioul** b. Pukadenn gibek, sk. : ar *rioul greiz* (Gl. *fovea centralis*), loet e-kreiz ar *vrizhenn* (Gl. *macula*) e blein adreñv al luc'hsae.

Foville : syndromes de ~ ◇ **Foville's syndromes** ◇ **azoniadoù Foville** Anvad stroll evit tri azoniad dastuat : 1) *azoniad troadel*, *azoniad a rizh I* pe *azoniad uhelañ*, diwar un anaf e parzh a-dor un troad empenn, naouus dre seiñ a-eiltu an dremm, an izili hag ar c'higennoù lagadc'hwelañ ; 2) *azoniad pontel uhelañ*, *azoniad a rizh II* pe *azoniad krenn*, diwar un anaf er pont,

naous dre seizi a-gendu nervenn loc'hañ al lagad ha seizi a-eiltu an dremm hag an izili; 3) *azoniad pontel izelañ, azoniad a rizh III pe azoniad izelañ*, diwar un anaf er pont, naous dre seizi a-gendu nervenn an dremm ha nervenn loc'hañ al lagad, seizi a-eiltu an izili (sl. *alterne : paralysie ~, protubérantiels : syndromes ~*).

foyer ◇ **focus** ◇ **1 sti g. 2 annon g. -ioù, sezenn b., -va g. 3 annon, kentsez b. 4 annon, oaled b., handarzh g. -ioù** 1 Lec'h kengerc'hañ skinoù. 2 Lec'hienn un anadenn reol pe ezreol er bevedeg, sk. : *annon blivaat, sezenn un torr, selaouennva*; lec'hienn a skign diouti un argerzh kleñvedel er bevedeg, sk. : *annon pore, kentsez ur c'hankr.* 4 Lec'h a 'r bed a dreled dioutañ un anadenn gevredadel, kleñvedel, h.a., sk. : *annonioù paludegezh, handarzh un darreuziad.*

foyer, focal(-)

- *bloc focal* tolc'had annonek • *choroïdite en foyer* tolgennsaefo annonek • *distance focale* stihed • *éclairage intense focalisé d'une surface réduite* bann luc'h kreñv stiet war ur gorread strizh • *embolie septique partie d'un foyer infectieux plus ou moins éloigné* enfroù lestek diouzh un annon pore loet pell pe belloc'h • *épilepsie focale* droukfell annonek • *foyer aortique* selaouennva aortek • *foyer d'auscultation* selaou-ennva • *foyer d'excitation* annon blivaat, annon broud • *foyer d'un abcès* annon ur pugnez • *foyer d'un miroir concave* sti ur melezeur argevek • *foyer de fracture* sezenn un torr, sezenn dorradur • *foyer épileptogène* annon droukfell • *foyer lacunaire* annon loezennek • *foyer hémorragique* annon gwadliñvel • *foyer lésionnel siègeant dans la zone du noyau lenticulaire* annon anafel e tachad ar gorron ferek • *foyer pulmonaire* annon skevent • *foyer purulent* annon linañ • *foyer tuberculeux* annon torzhellek • *lunettes bifocales* lunedoù daousti, daoustiek.

fracas ◇ **comminuted fracture** ◇ **bruzunad g.** Torr o vreviñ un askorn e tammoù munut (sl. *comminutif*).

fracture ◇ **fracture** ◇ **torr g., torradur g.** Odead darvezet en un askorn, klok pe diglok, gant pe hep dilec'hiadur a 'n tammoù; kemm a lakaer etre : an *torroù a-drastenn* (Gl. *f. de fatigue, f. de contrainte, Sz. fatigue f., stress f.*), o tarvezout e dianlen ur strivad kigennel taer; an *torroù danamaskornenn* (Gl. *f. sous-périostées, Sz. intraperiosteal f.*), torroù hep rogadur an amaskornenn; an *torroù darsiket* (Gl. *f. engrenées, Sz. impacted f.*), m'emañ an tammoù kenetresanket ha diloc'hekaet; an *torroù digor* (Gl. *f. exposées, f. ouvertes, Sz. open f.*), kehent ar sezenn anezho gant an diavaez dre ur gouli a 'r parzhioù meizh; an *torroù kelastrenn* (Gl. *f. en bois vert, Sz. greenstick f.*), torroù ar vugale, hep dilec'hiadur na peurrogadur ar gaenenn; an *torroù kleñvedien* pe *torroù emdarzh* (Gl. *f. pathologiques, f. spontanées, Sz. pathologic f., spontaneous f.*), da heul un daraez leiek war un askorn breskaet gant un anaez rakvezant; an *torroù serr* (Gl. *f. fermée, Sz. closed f., simple f.*); an *torroù ulidek* (Gl. *f. hélicoïdales, Sz. spiral f., torsion f.*).

fragilité osseuse héréditaire, ostéogénèse imparfaite ◇ **osteogenesis imperfecta** ◇ **breskted b. hêrezhel an eskern, askornbarañ diglok** Strafuilh hêrezhel paridigezh an askorn, ar bleuskenn brotided anezhañ pergen, lies rizh anezhañ hervez ma vez treuzkaset er mod aotzomek trec'hek pe enkilek.

fragment Fab ◇ **Fab fragment** ◇ **tammad g. Fab** (*F ab* : teskanv Sz. *antigen binding fragment*) drailhenn eus ur molekul immunoglobulin G bet troc'het an ereoù peptidek anezhañ gant enzimoù proteolitek; eus hevelep troc'hadur e tisoc'h 3 zammad : un tammad Fc ha daou dammad Fab; oc'h ober pep hini eus ar re-mañ ez a un hanter zigorvell ponner stag ouzh un digorvell skañv hag ul load kediañ ouzh an antigen (pep molekul antikorf o vezañ en araez da lenañ 2 volekul antigen).

fragment Fc ◇ **Fc fragment** ◇ **tammad Fc** (*Fc* : teskanv Sz. *crystallizable fragment*) drailhenn diwar droc'hadur ar molekul immunoglobulin G gant an enzimoù proteolitek (sl. *fragment Fab*), anezhi an hanter eus an daou zigorvell ponner hep load lenañ an antigen, e se hep araez antikorf; lenañ a ra ar glokaenn.

frag-

- *cal osseux entraînant la coaptation des fragments d'un os fracturé* klomenn askorn o startaat an tammoù bet kengovlet eus un askorn torret • *fragilité capillaire* breskted ar c'horrwazhiad • *fragments dermiques nécrosés* draillhoù tonenn marvennet • *multiplication des copies d'un fragment d'ADN* liesaat eiladoù un tammad DNA • *prélever, tailler, trancher un greffon ou un fragment osseux* erlemel, benañ, skejañ un imboudenn pe un draill askorn.

franges synoviales ◇ **synovial folds** ◇ **plegoù l. (g.) irus** Balirennoù war dalbenn diabarzh an irgennoù, anezho gwriad kenglenel gwazhiedet puilh hag a-wechoù gwriad behinel, o leuniañ an esaouennoù rez eus kavenn ar c'henvelloù.

fratrie ◇ **sibship** ◇ **1 gwelegorzh b. ioù 2 breuriad g.** 1 Teskad ar vugale ganet diwar an un koublad. 2 Teskad hiniennoù a un remziad en ur familh : breudeur, c'hoarezed, kendirvi, kenitervezed.

frein ◇ **frenum** ◇ **poell g.** Aspleg glaourgenn o vevennañ dilec'hiadur un organ, sk. : *poell an teod, poell an trapig klunegenn-sac'henn.*

frein : symptôme du ~ ◇ ◇ **azon an arouar** Gorrekaat trumm ur fiñv diarvenn heñvel ouzh gorrekaat trumm bannadur ur film, anadenn stadet er skleroz strewek hag en azoniadoù ilpennel.

freinage ◇ **frenation** ◇ **gevennañ** Diren gwerederezh un arc'hwel, sk. : *gevennañ ar gwerederezh nervel.*

freinage : test du ~ ◇ ◇ **suppression test** ◇ **prouad an astalif** Prouad amkanet da andalañ perzh ur c'horwered pe evit savelañ bezañs un usvorc'hañ pe, mar bez prouet an usvorc'hañ, evit spizañ ar wikefre anezhañ (pa ouzer, da skouer, ne vez ket astaladus an usvorc'hadou yoc'hennien) (sl. *épreuves fonctionnelles surrenales*).

frémissement ◇ **thrill** ◇ **skrij g.** Daskren munut hag herrek merzhet gant palv an dorn harpet plaen war ar rannbarzh argal-lonel, kendead d'ur sourr peurliesañ, erzerc'had un naoued trapigél; azon an isvold mintrek eo ar *skrij rouzmouzus* pe *rouzmouz* (sl. *cataire : frémissement ~*).

frémissement vibratoire ◇ **thrill** ◇ **fraoñv g.** Daskren herrek merzhet gant an dorn harpet plaen war un darvoll talmerenn-gwazhienn kevret, ouzh ar selaouennañ, gant ur sourr sistolek pe gendalc'hek.

fréquence ◇ **frequency** ◇ **1 talm g. -où 2 aliested b.** 1 (Fizik) niver koriou dre unanenn bad, eleze ginad an drovezh; evit un anadenn wagennel, niver al luskelladoù dre eilenn; liesad an talm dre an trohed eo herr an anadenn wagennel; dewerzhañ a reer an talm dre hertzou, un hertz (arouez : Hz) o vezañ par d'un drovezh dre eilenn. 2 (Stadegouriezh) dregantad elfennoù eus un teskad ganto un naouuster lavaret.

fréquen-

• *à des fréquences basses* izeldalm • *ensemble des fréquences des signaux* teskad talmoù an arhentou • *la chaleur dégagée par les courants de haute fréquence* ar wrez ganet gant ar redoù tredan uheldalm • *la fréquence d'un rythme* talm ur gorvez • *la fréquence et la précocité des complications* aliested hag abreted ar rouestlodoù • *la variété la plus fréquente des cyanoses congénitales* seurtad paotañ an dulazioù ganedigel • *mouvements variables dans leur distribution, leur fréquence, leur rapidité et leur intensité* fiñvoù kemmus o dasparzh, o aliested, o buanded hag o c'hreñvder • *ralentissement de la fréquence ventriculaire* gorrekaat talm ar c'hofig • *vibration de basse fréquence* daskren izeldalm.

friction ◇ **friction** ◇ **donrimiañ** Doare merata, anezhañ, dre vonedone ar bizied pe an dorn a-bezh arloet start ouzh ur parzh korf, ober d'an amwiskadoù riklañ war an talennoù don, ar c'higennoù hag ar stagelloù pergen.

Friedreich : **maladie de ~** ◇ **Friedreich's ataxia** ◇ **kleñved Friedreich** Anaez familhel, hêrezhel, treuzkaset er mod aotozomek enkilek hogos bepred, furm glokañ eus an *dic'henezhadurioù hêrezhel livennilpennel* (sl. *hérédodégénérescence spinocérébelleuse*), naouus, *ent klinikel*, dre zireizhoù ar c'henuzhañ loc'hadel (ankedre diasavel, argenk tabezilpennel), dre ur migevaot, ur c'hren diarvennel, un endoniseraz, steuz an damougoù a-stirenn, un arouez Babinski daoudu, disneuziadoù an treid hag al livenn, un nistagnuz, alies un tizhadur a'r c'haber kalon; gorrek e vez an dedro, adalek ar gaezouegezh betek ur stad a nammed krenn; *ent neuziadurel*, dre an *dic'henezhadur* er mel eus ar pañsoù hag ar gwriziennoù adreñv, eus ar forzhioù livennilpenn ha, leiekoc'h, ar forzhioù pikermenek : skoanet emañ kelligoù ar steuñvenn louet ha divielinaet ar steuñvenn wenn; astennet e vez ivez a-wechoù ar skoanadur da gerniel araoz ar mel, d'ar c'hef empenn, d'an ilpenn ha d'ar gronnoù ampikermenek.

frigidité ◇ **frigidity** ◇ **ylenegezh b.** Termen dispis oc'h aroueziañ ar skorted eus buhezadoù revel 'zo : c'hoant, bliz, boz, oriadell hag an anadennoù bredvededel kevret : gwagrennel (borc'hadoù), nervgaherel (kevodiñ); en 18t kantved ez arvered ar ger evit ar c'houreved hepken, pa gomzed en 20t eus *dic'halloud* (Gl. *impuissance*) ha hiziv eus *migevod* (Gl. *dysérection*) pe eus *anderod* (Gl. *anéjaculation*); hiziv e talvez evit an dioueroù benevel hepken, daoust ma talc'h aozerion d'ober gantañ en div rev (sl. *anaphrodisie, dysfonction érectile, orgasme*).

frisson ◇ **chill** ◇ **kridienn b.** Krenadenn direoliek ar c'higennoù rizennek, diaraoget alies gant un ervezh houpiğa, kevret gant santad ar riv.

froidure ◇ **frigorism, cold injury, frost-bite** ◇ **yenad g.** Anvad rumm an anafoù kroc'hen diwar wered ar yenion (milher, revadoù, troad foziou, troad peñse).

NOTENN : Endra reer *yenadoù* eus an anafoù kroc'hen, e reer *yenanaez* (sl. *cryopathie*) eus teskad an erzerc'hadoù devoudet gant an ardizh ouzh ar yenion : azoniad Raynaud, linadell, bezañs ar c'hrioglobulin, an aglutinin yen, troazhemoglobinegezh, h.a.

front ◇ **forehead** ◇ **tal g. -ioù** Lodenn grec'h ar fas ha rannbarzh araoz ar c'hloppenn gavalet etre ar brigenn e krec'h hag en daou gostez, ar gwaregoù abrant ha gwrizienn ar fri en traoñ (sl. *face*).

frontal ◇ **frontal bone** ◇ **askorn tal** Askorn undañvat ha kreizer loet e rannbarzh araoz ar c'hloppenn.

frontal : **syndrome** ~ ◇ **frontal lobe syndrome** ◇ **azoniad talel** Teskad azonou oc'h erzerc'haat tizhadur an dolbezenn dal, anezho strafuilhoù an noa, an neuzid, an erougañ (moria), direizhoù al lavar, ar c'hefrediñ hag an digoniñ (ankevaot, andigon ar c'herzhed), ezreolderioù an eraeziñ (anc'hwesa) hag an emgempouezañ.

frontofocomètre ◇ **lensometer** ◇ **ferennventer g. -ioù** Ardivink Optik evit muzuliañ skizhuster ar ferennoù dereizhañ.

frottement ◇ **friction rub, friction murmur** ◇ **tarav g.** Trouz eus div feilhenn ul levrgenn danijennek o rimiañ an eil ouzh eben, naouus d'an amgalonennfo pe d'ar c'hrezennfo.

frotteurisme ◇ **frotteurism** ◇ **froteriezh b.** Blizvar o c'hoarvezout a emfrotañ ouzh un den all hep rat dezhañ war glask d'ar blijadur revel.

frottis ◇ **smear** ◇ **lifrad g.** Erlemel ul lomm liñvenn (gwad, gleborenn diwar ur glourgenn) ha lifrañ gantañ ul lavnenn wer evit e arseliñ dre ar c'horrgeresker.

frott-

• *contusion résultant d'un frottement* kreud diwar rimiañ • *dermatose dyschroma-tique localisée aux points de frottement* dermatoz milivel lec'hiet er poentoù rimiañ • *force de frottement qui s'oppose au mouvement d'une particule dans un milieu liquide* nerzh rimiañ arbenniat ouzh loc'h ur rannig en ur metoù liñvel • *plaie cutanée par frottement* gouli kroc'hen dre c'hraspiñ, dre gignat, dre daravat • *user la peau par frottement pour enlever les couches superficielles* reñviañ ar c'hroc'hen evit dilemel ar gwiskadoù gorre anezhañ.

fructose ◇ **levulose, fructose** ◇ **fruktoz g.** Sukrenn eeun, heksoz parzhiat er sakaroz, bezant ent naturel e kalz frouezh hag er mel.

fructose : **épreuve de charge au** ~ ◇ **fructose intolerance test** ◇ **proud g. gougumer ar fruktoz** Imbourc'h embreget evit diurnat an enzimanaezioù o tizhout kennevid ar fruktoz, anezhañ ober euvriñ 30 g fruktoz dre m² gorread korf; gant ar gouzrec'h bonan ne gemm nemeur ar gwadvec'hioù glukoz ha fruktoz ha n'eus fruktozegezh na glukozegezh troazh; pa vez angougumer hêrezhel ouzh ar fruktoz, e sav a-dizh ar gwadvec'h fruktoz hag e tiskenn goude un eurvezh, tra ma vez ur gwadvisvec'h glukoz brevus.

fructose : **intolérance héréditaire au** ~ ◇ **hereditary fructose intolerance** ◇ **angougumer g. hêrezhel ouzh ar fruktoz** Anaez treuzkaset er mod aotzomek a-geñver gant un divigad fruktoz-1fosfat aldolaz, naouus, er vagadell hag er bugel, dre c'hweladoù, darvoudoù glukozwadvisvec'hel, dilerc'h kreskiñ, usvent avu, tuellennaez gant bezañs fruktoz, amindrenkennoù ha proteinoù en troazh, ezreolderioù o steuziañ ur wech lamet eus ar boued ar fruktoz hag an diaraogerioù anezhañ (sakaroz, sorbitol, inulin).

frustration ◇ **frustration** ◇ **1 divadiñ, divuziañ, angwalc'hañ 2 gouheb g., gouhebiñ** 1 Ober d'un den dioueriñ ar pezh emañ o c'hortoz, en deus gwir da gaout, a zo bet prometet dezhañ. 2 (Bredelfennerezh) plegenn ma emañ ar gouzrec'h a nac'h er outañ pe a nac'h outañ e unan aotren un arc'hadenn a-berzh luzad.

Fuchs : **tache de** ~ ◇ **Fuchs' spot** ◇ **pokard g. Fuchs** Tienn du livegat diwar ur gwadliñv en dolgennsae kreizet war ar vrizhenn o tarvezout e-kerz an isttiwel yud hag o tec'han un divigad muiek eus ar gweled (skotom kreiz).

fuchsine ◇ **fuchsine** ◇ **fuksin g.** Livuzenn vouk deveret diouzh an anilin, arveret er Vakteriouriezh evit livañ bazhilli Koch hag er Wiadoniezh, kevret gant ar rezorkin, evit livañ ent hanbarek ar gwiennoù dastennek.

fugue ◇ **fugue** ◇ **feiadenn b.** Dilez trumm al lec'h ma annezer evit mont da gantren e-pad un amzer hir pe hiroc'h; ent klasel e lakaer kemm etre ar feiaded kenskiantek (psikozeion, envidion, dilerc'heion, daraezidi) hag ar feiaded digenskiant (droukfell, arluzegezh); degouezhioù 'zo a chom diaes da renkañ en eil rumm pe egile, ar *feiadennoù darfellel* (Gl. *figues hystériques*) da skouer pe an *orc'had ankounel* (Gl. *ictus amnésique*), ma hañval ar gouziviad bezañ e piaou da lies hanren kenskiant (sl. *dédoublement de la personnalité*).

fuite dans la maladie ◇ **flight into illness** ◇ **tec'h g. er c'hleñved** Troienn bet arveret gant Freud evit merkañ e klask ar gouzrec'h en neuroz ur repu ouzh e genniñvoù; termen astennet e arver hiziv en tu all da amgant an neurozioù, evel e domani an anaezioù kreudel pe an daraezioù pa vez elfennoù bredel o c'hoari enno.

fuite : **syndrome de** ~ ◇ **aortic regurgitation syndrome** ◇ **1 azoniad silhadel aortek 2 azoniad fuadel** 1 Teskad arouezioù trobarzhel a 'r skorted aortek : poulzadoù talmerel reñverek, usheled ar gwask, poullz korrwazhiedel, bezant ivez en heptreugoù kleiz-dehou (dreistpad ar san dalmerel, fic'h aortenn-skevent). 2 Darvoud ar prederiadoù dre fraousistoliñ (sl. *électrosystolie*) oc'h erzerc'haat torradur un neudenn pe un diouer disfuiñ en tredanfraouaer, dinoet dre geñveriañ ar c'halonvarrwezadoù mareadek graet e ser evezhιεrezh an dougerion adalfou; ennegad groñs eo d'an adoberata.

Fukuyama : **syndrome de** ~ ◇ **Fukuyama type congenital muscular dystrophy** ◇ **azoniad Fukuyama, mideñv g. kaherel ganedigal a rizh Fukuyama** Seurtad mideñv dibaot ha grevus nes dre an tizhadur kaherel d'ar mideñv a rizh Duchenne, kevredet gant un dilerc'h bred hag ur gorrdroennegezh.

1 2 fulguration 2 étincelage ◇ **1 lightning stroke 2 fulguration** ◇ **1 foeltrevezh g., foeltrañ 2 elienerezh g., elieniñ** 1 Gwered ar foeltr war an traoù bev (sl. *électrisation, électrocution*). 2 Arver yac'hadel an elien tredan uheldalm hag uhelvar evit prederiañ ar yoc'hennoù yud, strafuilhoù 'zo a 'r gorvez kalon, sk. : *elieniñ enkavennel ar galon*, Gl. *fulguration cardiaque endocavitaire* (sl. *ablatif : méthodes ~ves*).

fuligineux ◇ **fuliginous** ◇ **huzilennek aa.** Goloet gant huzilenn, sk. : *divweuz huzilennek* (Gl. *lèvres fuligineuses*) (sl. *saburrat*).

fuliginosité ◇ **sordes** ◇ **huzilenn b.** Koc'hionad arzu gouzedet war an dent, ar munsunoù hag an divweuz e kleñvedoù 'zo (tifoid).

fumer la pipe ◇ ◇ **butuniñ ar c'horn** Doare analañ al ledseizidi komaek : e tu ar seizi e chom gwak ar jod hag e volc'h da geñver an ec'hanalañ.

fumigation ◇ **fumigation** ◇ **mogedennañ** Aozañ en ul lec'h kloz, diwar danvezennoù laiel, mogedennoù ha burezhennoù a glasker korvoñ o ferzhioù yac'hadel.

fundus, grosse tubérosité ◇ **fundus** ◇ **deun g.** Parzh krec'h ledan ar stomok loet dindan gouc'hell gleiz ar gelc'hspeurren.

fundusectomie ◇ **fundusectomy** ◇ **deunezvenañ** Dilemel deun ar stomok, parzh m'emañ ar borc'hañ trenkek, gwezh amkanet da brederiañ an angreizh.

funerarium, chambre funéraire ◇ **funerarium** ◇ **kimiati g. -où** Stavell ma lakaer a-wel ar c'horfoù kent an obidoù.

funiculaire ◇ **funicular** ◇ **funigel aa.** 1 A-zave da funig ar sper. 2 A-zave da funig ar begel. 3 A-zave d'ar *funiculus*, eleze da rann ar wrizienn nerval en he zreug e-barzh an toull etremelloù.

funiculalgie ◇ **funiculalgia** ◇ **funigost b.** 1 Nervost funig ar sper. 2 Laur diwar amwask ar wrizienn nervenn en he rann dreug dre an toull etre-melloù.

funiculite ◇ **funiculitis** ◇ **funigfo g.** Tanijenn funig ar sper, sk. : *ar funigfo darreuziat* (Gl. *funiculite épidémique*), stadet e Suindia hag e Sri Lanka, da wezher gwirheñvel dezhañ un diplostreptokok, naouus dre an derzhienn hag ur stad hollek grevus, o tedreñ e diouer mezegadur d'ur wadlestegezh varvus.

funiculite vertébrale ◇ **funiculitis** ◇ **funigfo mellenel** Tanailh ur wrizienn nerved amwasket en he zreug dre an toull etremelloù, da heul daralladoù daraezel pe remmel ar mellennoù, naouus dre laurioù untu, dargrezadoù, argrommadur al livenn.

furfur ◇ **furfur** ◇ **koc'han** s. Skantennoù ezkroc'hen.

furfuracé ◇ **furfuraceous** ◇ **koc'hane** aa. E rezh dispeliadoù munut, evel gourc'hennadur ar ruzell.

furuncle ◇ **furuncle** ◇ **hesked** g. **-où, -idi** Bolc'hennfo marvennus don eus ar c'hroc'hen, naouus dre ur goeñvenn gernennek enni un eskar bihan, ar gorbenn; gwezher boaz an hesked eo ar *stafilokok lineiat aourliv* (sl. **bourbillon**).

fuseau mitotique ◇ **mitotic spindle** ◇ **gwerzhid vitotek** Furmadur o tiwanañ er c'hitoplasm e dibenn ar profaz, anezhañ torkadoù korribelloù stignet etre an daou aster, o tasperzhiañ e dilec'hiadur ar c'hromozomoù etrezek bleinoù ar gellig.

fusée ◇ ◇ **garidenn** b. Erolad hir ha troielllek etre ur pugnez hag ar poent ma ezver al lin.

fusion ◇ **fusion** ◇ **eruniañ** Anadenn vredvedel a ra merzhout un ergorenn diwar an div skeudenn furmet war an div luc'hsae.

fusion

• *bruit résultant de la fusion des 3^{ème} et 4^{ème} bruits* trouz o tisoc'h eus aruniad an trede hag ar pevare trouz • *fusion osseuse intersomatique de deux ou plusieurs vertèbres* kendeuzad askorn etre daou pe lies korf mellenn • *inciser la fusion de la commissure entre les valves* skejañ kemped ar freilhoù etre-sac'helloù.

G

gain ◇ **gain** ◇ **savad** g. Rannad heled un arhent en ec'hank un trevnad, dre an heled anezhañ en enank; mar bez brasoc'h eget 1 ez eo an trevnad un amplaer, mar bez bihanoc'h ez eo un distaver.

gaine ◇ **sheath** ◇ **1 gouin** g. **2 feur** b. **3 kavn** g. 1 (Korfadurezh) lavnenn gengenel stirek pe stirekoc'h o c'hronnañ organoù, sk. : *gouin kigennoù eeun ar c'hof* (Gl. *gaine des muscles droits*). 2 Gwiskad (danvezenn lipidek, kelligoù) o c'holeiñ ar gwiennoù nervel, *feur vielin*, *feur Schwann* (Gl. *gaine de myéline*, *gaine de Schwann*) 3 ent deskrivadurel, esaouenn etre organoù dezhi neuz ur ganol, sk. : *kavn stirek ma tremen gwazhied ar vorzhed* (Gl. *gaine fibreuse des vaisseaux fémoraux*).

(-)**gain-**

• *diviser le gain de poids corporel par la quantité de protéines consommées* rannañ kresk ar pouez korf dre gementad ar proteinoù bevezet • *fil de radio-isotope gainé de platine* neudenn a skinizotop kaenet gant platin • *formation érectile engainant l'urètre* furmadur sonnidik o kaenañ ar c'han troazh.

galactagogue ◇ **galactagogue** ◇ **1 laezhec'holus** aa. **2 laezhec'holer** g. **-ioù** 1 O fonnaat al laezhvorc'hañ. 2 Danvezenn (lia, boued) laezhec'holus.

galactocèle ◇ **galactocèle** ◇ **laezhvozhell** b. Kist ennañ laezh daskemmet mui pe vui furmet da geñver al laezhvorc'hañ.

galactogène ◇ **galactogenic**, **galactogenous** ◇ **laezhvorc'heiat** aa. O tec'han al laezhvorc'hañ, sk. : *hormon laezhvorc'heiat* (sl. *prolactine*).

galactographie ◇ **galactography** ◇ **laezhkaserluniñ** Skinluniñ ar vronn goude ensinklañ un Xdemerenn er sanioù laezhkaser.

galactomètre ◇ **galactometer** ◇ **laezhdouesventer** g. **-ioù**, **galaktometr** g. **-où** Ardivink evit muzuliañ douester al laezh.

galactopexie ◇ **galactopexy** ◇ **galaktozlenañ** Krafañ ar galaktoz ouzh ar gwiadou.

galactophorite ◇ **galactophoritis** ◇ **laezhkaserfo** g. Tanijenn ar sanioù laezhkaser, forzhioù degorzhañ gwagrenn ar vronn.

galactophoromastite ◇ **galactophoritis with mastitis** ◇ **bronnfo** g. **laezhkaserien** Tanijenn ar vronn diwar astenn ul laezhkaserfo.

galactopoièse, **galactogénèse** ◇ **galactopoiesis** ◇ **laezhvorc'hañ** Arc'hwel parañ laezh gant gwagrenn ar vronn.

galactorrhée ◇ **galactorrhoea** ◇ **laezhver** g. 1 Usvorc'h laezh gant ur vagerez. 2 Beradur laezh e-maez aozioù bonan al laezhvorc'hañ (sl. *aménorrhée-galactorrhée : syndrome* ~).

galactose ◇ **galactose** ◇ **galaktoz** g. Sukrenn eeun 6 atomenn garbon (heksoz, monoholozid); disoc'hiñ a ra an izomer dehou (*D-galaktoz*) diwar dourannañ al laktoz (diholozid bezant el laezh, ec'haozadus e glukoz ha galaktoz).

galactosémie ◇ **galactosaemia** ◇ **gwadc'halaktozegezh** b. Bezañs galaktoz er gwad; ar *wadc'halaktozegezh c'handedig* (pe *diabet galaktozek*, *kleñved ar galaktoz*), hêrezhel, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, zo un anaez dibaot a'n nevezc'hanidi, naous, ent klinikel, dre ur c'hirroz torliñvek grevus gant usvent an avu hag ar felc'h, ikter padek, disvezhvar, ferennlug daoudou, strafuilhoù bredloc'hadel, o tedreiñ d'ar pare e degouezhioù zo goude diounit un hanren dilaezh; dianlen eo da ezvezañs an enzim a ra d'ar galaktoz treuzfurmiñ e glukoz, ar *galaktoz-1-fosfat-uridil-transferaz*.

galactosurie ◇ **galactosuria** ◇ **troazhc'halaktozegezh** b. Bezañs galaktoz en troazh.

gale, **scabiès**, **scabiose**, **psore** ◇ **scabies**, **itch** ◇ **hakrez** g., **gal** b. Kleñved kroc'hen devoudet gant un arvevad loenel (*sarkopted*), naous dre an debreon hag anafoù linennek, *irvi an hakrez* (Gl. *sillons de la gale*), klazet en ezkroc'hen gant parez ar sarkopt a sank enno he vioù.

gale du ciment ◇ **bricklayer's itch** ◇ **kravien** b. **ar simant** Kroc'henad micherel o tizhout micherourion ar simant, naous dre un debreon garv hag un dispuilhad krugennoù klisiet dre ar skribañ; sezet emañ an anafoù war an daouarn, an arzornioù hag an holl barzhioù e diastok ar simant, en arvar da likenekaat ha da ekzimatekaat.

gale filarienne ◇ **filarial itch** ◇ **kravien filarel** Dispuilhad debronek krugennburbuennnek damheñvel ouzh hini an hakrez a stader e kornog Afrika, kiriek dezhañ erialerezh an derm gant rizheloù ur filarideg, *Onchocerca volvulus*.

galéa aponévrotique, épicroâne ◇ **galea aponevrotica** ◇ **kokenn b. lienstirenek, galea g.** Lavnenn stirek heñvel ouzh un tokarn o c'hronnañ ar volzpenn hag oc'h unaniñ toroù tal ha kilpenn ar gigenn gilpenn-tal; goleet eo gant ar brigenn.

galénique ◇ **galenic** ◇ **galenek aa.** Adanv deveret diwar anv Galenos, mezeg gresian anvenek (131-201), arveret e termenoù mezegel : *remède* l. (g.) *galenek* (Gl. *remèdes galéniques*, Sz. *galenicals, galenics*), liaoù a orin struzhel a-gevenep d'an danvezennoù kimiek pur; *form c'halenek* (Gl. *forme galénique*) neuz gwisket gant al liaoù (moustrad, liñvenn sankadus, h.a.); *liaerezh galenek* (Gl. *pharmacie galéni-que*) rann eus al liaouriezh o plediñ gant treuzfurmerezh an aozadoù a orin diseurt (meinel, struzhel, loenel) e liaoù a furm c'halenek lavaret.

galénisme ◇ **galenism** ◇ **galenegezh b., galenouriezh b.** Doazhadur Galenos a lakae ar yec'hed e dalc'h ar pevar bonimor : gwad, flumm, apotum, melkoni.

galop

• *bruit de galop* korvez c'haloup, trilamm • *galop atrial* trilamm kentezel • *galop de sommation* trilamm a-vernied • *galop mésodiastolique* trilamm mezdiastol • *galop post-systolique* trilamm goudesistol • *galop présystolique* trilamm raksistol • *galop protodiastolique* trilamm deroù-diastol • *galop ventriculaire* trilamm kofigel (sl. *bruit de galop*).

galvanique ◇ **galvanic** ◇ **galvaniek aa.** A-zave d'ar red tredan untu.

galvanisation ◇ **galvanization** ◇ **galvaniegeañ** Arloañ yac'hadel redoù tredan untu izelvarr.

galvanisme ◇ **galvanism** ◇ **galvaniegezh b.** 1 Gwered ar redoù tredan untu war ar bevedeg. 2 Diwan ur red tredan untu er genoù etre daou varradur dent metalek.

galvanocautére ◇ **galvanocautery** ◇ **galvaniezer g. -ioù, tredanezer g. -ioù** Tommezer dalc'h het kann an edañv anezhañ dre ur red tredan untu izelvarr uhelread (sl. *cautére*).

galvanofaradisation ◇ **galvanofaradization** ◇ **galvani-faradegañ** Arloañ diaser redoù tredan untu ha redoù faraddek (sl. *faradisation*).

galvanopuncture ◇ **galvanopuncture** ◇ **galvaniwanañ** Seurtad nadozwanañ ma kaser ur red tredan untu izelvarr dre an nadozioù (sl. *acupuncture, électropuncture*).

galvanothérapie ◇ **galvanotherapy** ◇ **galvanigurañ** Arver yac'hadel ar redoù tredan untu izelvarr.

gamète ◇ **gamete** ◇ **gamet g. -où** Kellig revel, diforc'hekaet en isriezad ar metazoed e gamet gourevel ha gamet benevel, sk. : ar *vigellig* hag ar *spergellig*.

gamma-angiocardigraphie, γ-angiocardigraphie, angio-cardioscintigraphie ◇ **radioisotope angiocardigraphy** ◇ **γ-gwazhiedluniñ ar galon, γ-angiokardiografiñ, gwazhiedluniñ skingann ar galon** Studi kavennoù ar galon ha gwazhied bras diaz ar galon diwar-bouez ur skinizotop ec'hoder skinoù γ ensinklet en ur wazhienn ha luc'hskeudennet asteed e zehentadur dre araez ur c'hamera skingann.

gamma-angiographie, γ-angiographie, angioscintigraphie ◇ **radioisotope angiography** ◇ **γ-gwazhied-luniñ, γ-angiografiñ, gwazhiedluniñ skingann** Studi an amred talmerel ha gwazhiennel e-barzh un tiriad lavaret diwar-bouez ur skinizotop ec'hoder skinoù γ ensinklet en ur wazhienn ha luc'hskeudennet asteed e zehentadur dre araez ur c'hamera skingann.

gamma-ciné-angiographie, gamma-cinécardiographie ◇ **radioisotope cineangiocardigraphy** ◇ **γ-gwazhiedfiñvluniñ ar galon, γ-kineangiokar-diografiñ, gwazhiedfiñvluniñ skingann ar galon** Fiñvskuedenniñ dre ur c'hamera skingann dehentadur ur skinizotop ec'hoder skinoù γ e-barzh kavennoù ar galon ha gwazhied bras diaz ar galon; mod imbourc'h spisoc'h evit studiañ dialusk ar galon eget ar gwazhiedluniñ skingann luc'hskeudennel.

gamma-encéphalographie, -encéphalographie ◇ **gammagraphy of the brain** ◇ **γ-empennluniñ, γ-luniñ an empenn, gammaluniñ an empenn** Imbourc'hiñ an empenn diwar-bouez ur skinizotop (gwadveiz-albumin tiellet gant an iod pe an teknetiom 99m) ensinklet en ur wazhienn ha dinoet dre ur c'houster Geiger; an araez eo da zeznaouiñ ha da zelec'hiañ anafoù gwazhiedet puilh (yoc'hennoù, hogennadoù gwad, kleizennoù).

gammaglobuline, γ-globuline ◇ **gammaglobulin** ◇ **gammaglobulin g., γ-globulin** Proteinoù eus ar gwadveiz, ar rann anezho o tilec'hiañ ar gorrekañ e-kerz an tredannizhañ; en o zouez emañ an immunoglobulinoù, skor antikorfoù ar gwadveiz.

gammaglutamyl-transpeptidase, gammaglutamyl-transférase, gamma GT, γ-GT ◇ **gammaglutamyltranspeptidase, γ-GT, GGT** ◇ **gammaglutamil-transpeptidaz g., γ-GT g., GGT g.** Enzim o tasperzhiañ e kennevid ar glutation; sevel a ra ar gwadvec'h anezhañ en alkoolegezh henek hag e kleñvedoù diseurt a'n avu, en diabet, er mononukleoz poreel, en angwazhiad ar c'haer kalon, h.a.; dindan 40 UE/l (unanenn etrevroadel dre litr) emañ ar feur reol anezhañ.

gammopathie ◇ **gammopathy** ◇ **gammanaoued g., gammapatiezh b.** Kleñved naouus dre un ezreolder eus gamma-globulinoù ar gwadveiz (sl. *agamma-globulinémie, dysgammaglobuli-némie, dysglobulinémie, immunoglobulino-pathie*).

gammaphlébographie, γ-phlébographie ◇ **gammaveno-graphy** ◇ **γ-gwazhiennluniñ, γ-flebografiñ, gwazhienn-luniñ skingann** Studi neuziadurel hag arc'hevel ar c'hefioù gwazhiennel diwar-bouez ur skinizotop ec'hoder skinoù γ ensinklet en ur wazhienn en argrec'h an tiriad da imbourc'hiñ ha luc'hskeudennet asteed e zehentadur dre araez ur c'hamera skingann.

gammagraphie ◇ **gammagraphy** ◇ **gammaluniñ** Imbourc'hiñ un organ dre ensinklañ engwazhiennel un izotop ec'hoder skinoù γ ha luc'hskeudenniñ asteed e zehentadur dre araez ur c'hamera skingann (sl. *gamma-angiocardigraphie, gamma-encéphalographie, hépatographie*).

gammathérapie ◇ **gammatherapy** ◇ **gammagurañ** Seurtad skingurañ o korvoñ ar skinoù γ ec'hodet gant ar radiom pe ar skinizotopou kalvezadel evel ar c'hobalt 60.

gammatomographie ◇ **gammatomography** ◇ **γ-haenluniñ** Lerc'hwezañ, dre araez ur c'hamera skingann, skejadoù un organ lenet gantañ ur skinoler (gwadveiz-albumin tiellet gant an teknetiom 99m peurliesañ); dre c'hweladur ar c'hamera en dro d'ar gouziviad e tastumer stlennadoù a dalvez da savelañ skeudennoù a-skej diouzh teir zalenn, a-dal, a-saezh, azremm bannet war skramm un hevel; pa haenluner ar galon e c'houbreder ar c'hamera ouzh ur c'halonvarwezer war-benn kaout skeudennoù da ampoent ar sistol hag an diastol ha, drezo, studiañ korzh ar speurioù, ec'honad ar c'havennoù, gwerzhadoù an diflitr hag an ec'hongas.

gamonte, gamétocyte ◇ **gamont** ◇ **gamont** g. Furm revek ha diforc'hek hematozoed ar baludegezh, ankleñvedus evit an den, poreüs evit ar moustik.

gamophobie ◇ **gamophobia** ◇ **dimezkaz** g. Aon kleñvedel rak an dimeziñ.

gangliectomie ◇ **gangliectomy** ◇ **kangrennezvenañ** Dilemel ur gangrenn, peurliesañ eus ar c'hefioù simpatek dargreiz pe gouzoug-kein.

1 ganglion 2 ganglion ou nœud lymphatique ◇ **1 ganglion 2 lymphatic node** ◇ **1 kangrenn b. 2 gwerblenn b., klom g. -où limfel** 1 Tolpad kelligoù nerval loet e-maez an nervahel, ouzh e ober a) evit a sell kangrennoù a-livenn ar gwrizennoù a-gein, korfoù kellig ar protoneuron santout, b) evit a sell ar c'hangrennoù simpatek, korfoù kellig an neuron santout en erdu ar flugez pe ar gwazhied. 2 Tolpad kelligoù e rezh ur bos war dreug ur wazhiedenn limf, a stumm hirvoan pe favennek, loet a-strolloù e gwrizienn an izili hag a-hed ar gwazhied bras.

ganglion ciliaire : syndrome du ~ ◇ **ciliary ganglion syndrome** ◇ **azoniad kangrenn ar saeoù** Seurtad nervostegezh a 'n dremm diwar hegadur kangrenn ar saeoù (loet houmañ war gostez diavaez nervenn ar gweled), naous dre laurioù al lagad hag ar fri, darwazh ar gevresae, daeraouiñ, friver, gouliñv ar malvennoù, uc'heraez hag a-wechoù angreizh ar gornsa.

ganglion sentinelle ◇ **sentinel node** ◇ **gwerblenn c'hed** Kentañ gwerblenn o teoueriañ al limf eus ur c'hankr (melanom, bronnn); da heul he spislec'hiañ dre araez ul livoler pe ur skinoler ensinklet e kefin ar yoc'henn en he bevsaver war-benn ennegañ pe get karzhadur gwerblennoù an tiriad.

ganglioneurome ◇ **ganglioneuroma** ◇ **ganglioneurom** g. Yoc'henn guñv, kelligoù nerval ha gliel odour ha diforc'hek ouzh he ober, evodet peurliesañ diouzh ar c'hef simpatek pe diouzh ar vezonuslouezhenn, dibaotoc'h diouzh an nerved kreiz.

ganglionite ◇ **ganglionitis** ◇ **kangrennf** g. Tanijern ur gangrenn.

ganglioplégique ◇ **ganglionic blocking agent, ganglioblocking** ◇ **1 kangrenndolc'her aa. 2 kangrenndolc'her g. -ioù** 1 O herzel ouzh gwered an aketilkolin, hanterad kimiek er c'hangrennoù simpatek ha parasimpatek. 2 Danvezenn gangrenndolc'her.

ganglioside ◇ **ganglioside** ◇ **gangliozid** g. Mukolipid eus stroll ar glikosfingoideier, tri seurtad anezho : ar mono-, di- ha tri-sialo-gangliozidoù, arouezet a-getep GM, GD ha GT; ent vonan e vez GD1 ha 2, GM1 bezant en empenn.

gangliosidose ◇ **gangliosidosis** ◇ **gangliozidoz** g. Kleñved enzimatek eus stroll al lipidioziou, naous dre an usvec'h hollek pe lec'hiek gangliozidoù er bevedeg; pa vez lec'hiek e tizh an nerved kreiz dreist holl; diforc'het ez eus furmoù niverus gangliozidoz : kleñved Norman-Wood (furm c'handedigel), kleñved Tay-Sachs (furm vugelel), diodezh steuzwelel (Gl. *idiotie amaurotique*), h.a.

gangrène ◇ **gangrene** ◇ **breinged g.** Marvennadur ar gwiadoù gant pe hep poreadur eilvedel; hervez ar furmoù e tiforc'her ar *b. gwenn* pe *heskwadien* (Gl. *g. blanche* pe *ischémique*), gantañ un drouskenn a liv gwenn laezhek, ar *b. linkr* (Gl. *g. humide*) ma vez trec'h ar breinañ, ar *b. sec'h* pe *balzamat* (Gl. *g. sèche, momification*), gantañ gwiadoù du, krinet, hep nemeur a vreinadur, diwar steviad un dalmerenn peurliesañ (sl. *escarre, gangrène gazeuse, nécrose*).

gangrène gazeuse ou gazogène ou foudroyante, œdème malin ◇ **gas gangrene, gaseous or mephitic gangrene, emphysematous phlegmon, malignant edema** ◇ **breinged goüs pe mouezhus pe klogorus, gouliñv g. yud, morfer g. goüs pe klogorus** Rouestlad ar goulioù krouizek, diwar diñvidigezh ur bakteri anaerat (*Clostridium perfringens, Clostridium septicum*), naous dre vreinadur ar gwiadoù, dilaosk aezhenn, daralladur ar stad hollek hag un dedro aloubus, marvus peurliesañ.

Ganser : syndrome de ~ ◇ **Ganser's syndrome** ◇ **azoniad Ganser** Furm dislen en darempredoù : respont hebiou (*skeovatebiñ*, Al. *Vorbeireden*), realañ e-maez plegenn (*skeoversaviñ*, Al. *Vorbeihandeln*), strafuilh stadet e lies bredanaez evel ar skizofreniezh, an arluz, an darfell.

gargarisme ◇ **gargle** ◇ **1 gargouilh g. 2 gargouilhat** 1 Lec'hangevezh liñvel a vourboulher e goueled ar genoù hep e lonkañ. 2 Kemer ur gargouilh.

garrot ◇ **garrot, tourniquet** ◇ **rolt** g. Anro dastennek a arloer en dro d'un ezel e sell da astaliñ amred ar gwad gwazhiennele pe dalmerel; an un disoc'h a ziraezer diwar-bouez un anro *hevolc'h* (Gl. *garrot pneumatique*) (sl. *anesthésie régionale intraveineuse*).

gasp ◇ **gasp** ◇ **gourroc'h** g. Gwaskad anal ampl ha trouzus o tarvezout e dibenn an dremenven.

gassérectomie ◇ **gasserectomy** ◇ **gaserezvenañ** Dilemel ar gangrenn drigevellet (bet anvet *kangrenn Gasser*, PNA *ganglion coeliacum*, Br. *kangrenn geliakel*, anvet hiziv TA *ganglion trigeminale*), oberatadenn gwezhiet war c'houziviaded nervost an dremm.

gastralgie ◇ **gastralgia** ◇ **kreuzost b.** Laur o tont eus ar stomok hag anglevet gant ar c'hlañvour en e argreuzenn.

- gastrectasie** ◇ **gastric dila(ta)tion** ◇ **usvoll g. ar c'hreiz, kreuzusvoll g.** Muiadur endalc'h ar stomok (sl. *dilatation aiguë de l'estomac*).
- gastrectomie** ◇ **gastroctomy** ◇ **kreuzezvenañ** Dazbidañ ar c'hreiz; hervez al ledad dilamet e reer anv eus *k. hollel* (Gl. *g. totale*) gant dasforzhañ rageun ar c'hardia ouzh ar yunegenn (kankroù ledek ha lec'hiet uhel); eus *k. lec'hedek* (Gl. *g. élargie*) gant ezvenañ, ouzhpenn ar stomok, an dalmerenn gleiz hag ar gwerblennoù anezhi, an danter bras, ar felc'h, lost an ilgreiz ha, gwechoù 'zo, ur parzh eus ar c'holon; eus *k. darnel* (Gl. *g. partielle*), an aliesañ, anezhañ ur porzhierzevenañ ledan pe ledanoc'h.
- gastrine** ◇ **gastrin** ◇ **gastrin g.** Polipeptid ouzh e ober un digorvell 17 amindrenkenn, hormon borc'het gant kelligoù mougev ar porzhier pa vezont fraouaet gant ar vezañs er stomok eus bouedoù 'zo (douhennadoù kig, alkaliegoù, alkool), gant frankaat ar vougev pe, e troioù 'zo, gant fraouaat an nervenn dispis; tremen a ra en amred ha dec'han borc'herezh kreuzel ar pepsin hag an HCl, enzimoù an ilgreiz, argrezerezh ar stomok, ar pervez hag ar gellenn vestl.
- gastrinémie** ◇ **gastrinaemia** ◇ **gastrinwadvec'h g.** Feur gwad ar gastrin, uhel e kleñvedoù 'zo evel en amwad Biermer.
- gastrinome** ◇ **gastrinoma** ◇ **gastrinom g.** Yoc'henn o vorc'hañ gastrin, loet en enezigoù Langerhans pe dindan glaourgenn mougev an treizher.
- gastrique, stomacal** ◇ **gastric, stomachal, stomachic** ◇ **˘kreuz, kreuzel aa., ˘stomok, stomokel aa.** A-zave d'ar c'hreiz.
- gastrique : crise** ~ ◇ **gastric crisis** ◇ **gwaskad g. stomok** Barr laur brevus en argreuzenn, gant c'hweladoù dizehan, e-doug un nebeut devezhioù, o teraouiñ hag oc'h echuiñ trumm; dilaur e vez ar stomok etre ar gwaskadoù; anaez o tarvezout gant gouzviaded an tabez.
- gastrite** ◇ **gastritis** ◇ **kreuzfo g.** Tanijenn lemm pe henek glaourgenn ar stomok.
- gastrocèle** ◇ **gastrocele** ◇ **kreuzogad g.** Avelenn ar stomok.
- gastrocolite** ◇ **gastrocolitis** ◇ **kreuzkolonfo g.** Tanijenn ar stomok hag ar c'holon kevret.
- gastrocoloptose** ◇ **gastrocoloptosis** ◇ **kreuzkolonislink g.** Dilec'hiadur war-draoñ ar stomok hag ar c'holon treuz.
- gastroduodénectomie** ◇ **gastroduodenectomy** ◇ **kreuzdaouzegeñnevenañ** Dazbidañ daoufarzh izelañ ar stomok ha kentañ rann an daouzegeñn.
- gastroduodénite** ◇ **gastroduodenitis** ◇ **kreuzdaouzegeñnfo g.** Tanijenn ar stomok hag an daouzegeñn kevret.
- gastroduodénostomie** ◇ **gastroduodenostomy** ◇ **dasforzhañ kreuzdaouzegeñn** Amparañ ur c'hehentad etre ar stomok hag an daouzegeñn en ur skejañ ar porzhier.
- gastroentérite** ◇ **gastroenteritis** ◇ **kreuzpervezfo g.** Tanijenn glaourgenn ar stomok hag ar pervez, diwar bakteri pe viruz, naous dre heugenoù, c'hweladoù, darc'hoal, o tarvezout alies e rezh darreuziadoù bloaziek.
- gastroentérologie** ◇ **gastroenterology** ◇ **kreuzpervezouriezh b., koazhadouriezh b.** Diskiblezh vezegel o plediñ gant kleñvedoù ar stomok hag ar pervez.
- gastroentérostomie** ◇ **gastroenterostomy** ◇ **dasforzhañ kreuz-pervez** Kehentaat talbenn adreñv mougev ar porzhier hag ur c'hilbleg pervez (ar yunegenn).
- gastrofibroscope, fibrogastroscope** ◇ **gastrofibrescope** ◇ **gastrofibroskop g.** Fibroskop arveret da imbourc'hiñ kavenn ar stomok.
- gastrofibroscopie, fibrogastroscopie** ◇ **gastrofibroscopie** ◇ **kreuzluc'hwereañ** Hentenn imbourc'hiñ gweledel kavenn ar stomok diwar-bouez ur feskenn edañvoù kouarz (fibroskop) ebarzhet dre hent an treizher.
- gastrogastrostomie** ◇ **gastrogastrostomy** ◇ **dasforzhañ kreuz-kreuz** Kehentaat an div gavenn eus ur stomok aet da zivlog da heul ur strishaenn (sl. *biloculaire : estomac* ~).
- gastro-iléostomie** ◇ **gastroileostomy** ◇ **dasforzhad g. kreuz-klunegenn** Difourkadur ar glunegenn er stomok da heul ur fazi oberata, o tevodañ stafuilhoù kennevidel marvus war verr dermen e diouer ur gwezh surjanel nevez.
- gastrolyse, gastrolysis** ◇ **gastrolysis** ◇ **kreuzezglenañ** Gwezh surjanel, anezhañ loezañ ar glenelloù hag an naskoù etre ar c'hreiz hag an organoù amezek.
- gastromyxorrhée** ◇ **gastromyxorrhoea** ◇ **glaourver g. stomok** Usvorc'h glaour er c'hreiz o tarvezout diastal pe a-c'hreiz-varroù hag o tec'han c'hweladoù glaourek ha bestlek, puilh ha diheud.
- gastroparésie** ◇ **gastroparesis** ◇ **kreuziskorz h.** Digresk amplek ha gorrekadur loc'hoù ar stomok.
- gastropathie** ◇ **gastropathy** ◇ **1 kreuzad g., kreuzanaez g. 2 kreuznaoued g. -où** 1 Anvad rumm klañvadurioù ar stomok. 2 Anvad rumm kleñvedoù ar stomok naous dre un anaf, ur gammneuziad, un tizhad neuziadurel, eleze organel ha n'eo ket arc'hwelel hepken.
- gastroplastie** ◇ **gastroplasty** ◇ **kreuzatelviñ** Gwezh surjanel dereizhañ pe dazluniañ war ar stomok.
- gastroplégie** ◇ **gastroplegia** ◇ **kreuzankorz h.** Astal loc'hoù ar stomok ha kreuzusvoll da heul skejañ kef an nervenn dispis.
- gastroprive** ◇ **gastroprivic** ◇ **olkreuzien aa.** Dec'honet gant ezvezañs ar stomok, sk. : *amwad olkreuzien* (Gl. *anémie gastroprive*).

- gastropylorospasme, maladie des vomissements habituels** ◇ **pyloric spasm of the newborn** ◇ **kreuzporzhierandag g.**, **porzhierandag an nevezc'haned** Dargrezañ andagek ar c'hreiz hag ar porzhier o tarvezout gant magadelled, etre 15 ha 30 munud goude denañ, hag o tec'han c'hweladoù a-vomm.
- gastrorragie** ◇ **gastrorrhagia** ◇ **kreuzwadiñv g.** Gwadiñv eus talbenn diabarzh ar stomok oc'h erzerc'hañ dre ar c'hweladoù gwadek pe ar melena.
- gastrorrhaphie** ◇ **gastrorrhaphy** ◇ **kreuzdlita** Krafalañ speur ar stomok.
- gastrorrhée** ◇ **gastrorrhoea** ◇ **kreuzver g.** 1 C'hwelad pe distreizhad ul liñvenn dourek o tont eus ar stomok klañv. 2 Usvorc'h diastal sug ar c'hreiz.
- gastroscopie** ◇ **gastroscopy** ◇ **kreuzengweliñ, kreuzwerañ** Ensellout war eeun kavenn ar stomok gant un ardivink arbennik (gastroskop) ebarzhet dre an treizher (sl. *gastrofibroscopie*).
- gastrostomie** ◇ **gastrostomy** ◇ **kreuzeforzhañ** Dewerc'hañ un digor padek etre ar stomok ha speur ar c'hof o kevaraezañ ebarzhiñ boued dre ur sont pa vez steviet lodenn uhelañ ar ganol vezhur.
- gastrotomie** ◇ **gastrotony** ◇ **kreuzbenañ** Digeriñ surjanel ar stomok goude torenbenañ.
- gastrula** ◇ **gastrula** ◇ **gastrula g.** Pazenn rizhell e o tont da heul ar blastula; e dibenn ar gastruladur, e c'hoarvez ar rizhell a deir feilhenn gevizik: endoderm, mezoderm, ektoderm.
- gastrulation** ◇ **gastrulation** ◇ **gastruladur g.** Emouinadur ar blastula o tisoc'h gant pazenn ar gastrula (sl. *blastula*).
- gâteux** ◇ **suffering from gatism** ◇ **1 andalc'hiat aa., andalc'hiad g. ed 2 toc'hen aa. & g. -ion, kabac'h aa.** 1 Anv roet d'ar glañvourion (seizidi, psikozeion, dilerc'heion, envidion) o leuskel andiarvenn troazh hag oulennoù. 2 Termen arveret da aroueziñ ar gozhiaded gwanaet o arc'hwelioù kreudel ha bredel.
- gaucher, -ère** ◇ **left handed** ◇ **1 kleiziat aa. 2 kleiziad g. -ed, -ez b. -ezed** 1 Gant an tued enganet hag eiltroüs d'ober gant an dorn hag an troad kleiz evit ar fiñvoù diarvenn pe emdarzh. 2 Den kleiziat; *kleiziad kontrollet* (Gl. *gaucher contrarié*) a reer eus ar c'hleiziad rediet da wezhiañ (skrivañ, embreger binvioù) gant e zorn dehou hepken (sl. *ambidextre*).
- Gaucher : maladie de ~** ◇ **Gaucher's disease** ◇ **kleñved Gaucher** Neurolipidoz eus stroll ar sfingolipidozioù a-geñver gant un divigad glukokerebrozidaz kiriek d'un usvec'h glukokerebrozidoù er flugez, naouus dre usvent ar felc'h hag an avu, amwad, livedag melen-okr an amwiskadoù hag ar c'hevresaeoù, lec'hiaourioù skeventel hag askomel; er furmoù grevus ha kentrat (3^e-4^e miz an hoali) e stader ouzhpenn se direizhoù navel (ankewant, bihanez ar fiñval, ustant, loakrerezh, barradoù glizi); prederiet e vez dre an enzimgurañ amsaviñ dre ziounit glukokerebrozidaz torzhiennel pe dre imboudañ mel eskern.
- gauss** ◇ **gauss** ◇ **gaos g. -où** Unanenn CGS an derenvaez (Gl. *induction magnétique*) (arouez : G), 1 G = 10⁻⁴ T (sl. *tesla*).
- gavage** ◇ **gavage** ◇ **darbaskañ** Ebarzhiñ boued er stomok dre araez ur gorzenn, mod boueta arveret pa na c'hell ket ar gouziviad lonkañ, da skouer pa vez seizet e c'hargadenn; ivez pa nac'h emvagañ (e bredkleñvedoù evel ar velankoliezh, psikoziou 'zo, an disnaon, h.a.).
- gaveurs de pigeons : maladie des ~** ◇ **pigeon breeder's lung** ◇ **kleñved pe skeventad an darbaskerion du-beed** Aspergilloz dastumet dre hantererezh ar greun maiz kemeret en e c'henoù gant an darwasker evit o enc'hwezhañ e-barzh pigoan an dube, poread foueel o tizhout ar skevent (skrouediadoù gwad) hag ar c'hroc'hen (eritem, burbuennnoù, gouliezoù, yoc'hennoù fic'hek dangroc'hen).
- Gayet-Wernicke : encéphalopathie ou maladie de ~** ◇ **Wernicke's encephalitis, superior haemorrhagic polioencephalitis** ◇ **empennaoued Gayet-Wernicke, louedempennfo g. uhelañ gwadiñvel** Kleñved naouus, *ent clinique*, dre erzerc'hadoù bredel (arluz, ezaouiñ en amzer) ha navel (direizhoù ar c'hempouez, dargrezañ ampikernennek, fiñvoù ezreol, seizi an daoulagad); *ent neuziadurel*, dre anafoù (en neuroglia, er gwazhied hag er c'helligoù navel), gwadiñvek a-wechoù, en dro d'an ependim etre an 3^e hag ar 4^e kambr — anafoù a gaver ivez en azoniad Korsakoff; kiriek d'ar c'hleñved eo negez ar vitamin B₁ e dianlen an alkoolegezh pe, dibaotoc'h, anaезioù o tevoudañ un disvezhur grevus; e diouer ur gwezheriadur a zoenoù uhel dre ar vitamin B₁, e tedro ar c'hleñved afo d'ar marv (sl. *encéphalopathie alcoolique*).
- gaz carbonique : capacité du sang en ~** ◇ **CO₂ combining power** ◇ **gwadlenusted b. CO₂** Kementad uc'hek dioksidenn garbon a c'hell ar gwad lenañ dindan ur gwask par da wask darnel an aezhenn-se el logigoù skevent, eleze 40 mm Hg.
- gaz carbonique : concentration ou contenance ou teneur du sang en ~** ◇ **plasma carbon dioxide content** ◇ **gwadvec'h g. CO₂** Feur an dioksidenn garbon lenet gant ar gwad, eleze ent reol a 60 da 68 mL dre 100 mL gwad a 'r gwazhiennoù, a 50 da 55 mL dre 100 mL gwad a 'n talmerennoù; diwar ar feurioù bloc'hel-se, e vez 3 mL dileizhet er plasma, 3 mL ereet ouzh proteinoù ar c'helligoù, ar pep all kediet ouzh bazennoù ar plasma e rezh bikarbonatoù oc'h amparañ ar c'hadavad alkali.
- gaz carbonique éliminé : débit du ~** ◇ **carbon dioxide elimination** ◇ **ec'hongas ezvevenañ ar CO₂** Ec'honad CO₂ dewerzhed e mililitroù distaolet dre vunud gant amred ar gwad el logigoù skevent hag ezwentet dre an anal, eleze ent reol 200 mL/min.
- gazométrie** ◇ **gazometry** ◇ **aezhennventañ** Muzuliañ feur aezhennoù (O₂ ha CO₂) ar gwad.
- gel** ◇ **gel** ◇ **gel g. -où** Sonnenn o tisoc'h eus kaouledadur un dileizhenn golloidel pe *sol*; arveret e vez ivez *gel* evel lostrann : *hidrojel, organogel* (Gl. *hydrogel, organogel*).
- gelatine** ◇ **gelatine** ◇ **gelatin g.** Furm dourzelezh ar c'hollagen diaturet dre domañ.

gélification ◇ **gelation** ◇ **gelaat** Argerzh furmiñ ur gel.

Gellé : **syndrome de** ~ ◇ **Gellé's syndrome** ◇ **azoniad Gellé** Ledseizi dastuat diwar un anaf er pont, naouus dre strafuilhoù kleved agendu d'an anaf hag, a-eiltu, ul ledc'houseizi hag, a-wechoù, ur seizi a 'n dremm.

géloso ◇ **gelose** ◇ **geloz** g. Gel o tont eus un alg, an agar, a zanvezer da aozañ meteier tiñvañ.

gélule ◇ **capsule** ◇ **bolc'han** g. -où Furm c'halenek da euvriñ o c'hoarvezout eus div gibig gelatin skarvet an eil ouzh eben etrezo un danvezenn hueek (sl. *cachet*).

gel(-)

- *d'aspect gélatineux* kaotek, kaotvanek • *gel d'amidon dans la glycérine* gel ampez er glikerol • *inclus dans un gel* entoueziet en ur gel • *précipitation dans un milieu gélifié* goueledadur en ur metoù gelaet.

gelure ◇ **frostbite** ◇ **revad** g. Anaf diwar ar yenion o sezañ e bleñchoù an izili hag en dremm; en deroù e wenna, e reuta, e tisanta an eizhaennoù, lankad ar gwazhiedstrishaat heuliet gant ul lankad astommañ, laurus, ma teu e liv en-dro gant ar c'hroc'hen; en degouezhioù grevus, e tarvez trombozioù talmerlec'hiek o tec'han filboc'hennoù ha breinged (sl. *cryopathie, engelure, froidure*).

gémellaire ◇ **gemellary** ◇ **1 gevellek** aa. **2 gevellel** aa. 1 Gantañ daou c'hevell, sk. : *brazedded c'hevellek*. 2 A-zave da c'hevelled, sk. : *azoniad gevellel*.

gémellipare ◇ **gemellipara** ◇ **1 gevellc'haner** aa. **2 gevellc'hanerez** b. -ed 1 O tougen pe o c'henel gevelled. 2 Mamm da c'hevelled.

gémelliparité ◇ **gemelliparity, twin pregnancy** ◇ **gevellc'haneriezh** b. Stad ur vaouez o tougen pe o c'henel gevelled.

gémellité ◇ **twinning** ◇ **gevellled** b. Bezañs daou c'hevell; anv a reer eus *gevellled unkadoanel* (Gl. *gémellité univitelline*), pa zeu an div rizehell eus an un vi, eus *gevellled daougadoanel* (Gl. *gémellité bivittelline*) pa zeuont eus pep a vi.

gémination dentaire ◇ **dental gemination** ◇ **dec'hevellad** g. **dentel** Uniad ezreol div eginenn dentel.

gémigné ◇ **geminat**, **geminous** ◇ **gevellat** aa. A-zivout ergorennoù stalet a-zauadoù.

NOTENN : Heñvelster eo Gl. *gémigné* ha *bigémigné*, nemet ez eo ar boaz ober anv eus Gl. *pouls bigémigné* da arouezañ ur poulz ma verzher un daouad lammoù e-lec'h unan, oc'h erzerc'haat bezañs un dreistsistol diouzhtu goude ar sistol reol (Br. *pouls gevellat*) (sl. *bigémínisme*).

gemmothérapie ◇ **gemmotherapy** ◇ **broñskurañ** Arver yac'hadel ar broñs struzhel fresk.

généralcoïde ◇ **genalkaloid** ◇ **genalkaloid** s. & g. Deverad diwar un alkaloid, oksidet ennañ ar soaz nitrogenek, ken gweredus hag an alkaloid ha bihanoc'h e bistrizegezh.

gencive ◇ **gum** ◇ **munsun** b. Parzh eus glaourgenn ar genoù o c'holeiñ ribl logigoù an dent.

gène ◇ **gene** ◇ **genenn** u., s. : **gen** Unvez elfennel eus an DNA, rannig loet en ur poent savelet eus ur c'hromozom (*lokuz*), he arc'hwel kimiek devoudañ furmidigezh ur polipeptid, he c'hefridi vevoniel treuzkas ha diorren doareennoù hêrezhel an hinienn; dre an dasparañ e c'hell pep genenn genel ur c'henenn unrezh dezhi; gant pep genenn ivez ez eus un debegezh a zargenañ; *kistron* a reer eus ar c'henenn pa zeseller he arc'hwelioù ha re pep hini eus he c'hedrannoù (sl. *cistron, codon, héredité, désoxyribonucléique : acide ~, exon, locus, mutation, muton, opéron, recombinaison, recon, répliation, répresseur*).

gène candidat ◇ **candidate gene** ◇ **genenn war ar renk** Genenn a c'houseseller evel kiriek d'ur c'hleñved hêrezhel.

gène d'histocompatibilité ◇ **histocompatibility gene** ◇ **genenn wiadkempadusted** Genenn a zo ar vezañs diaser anezhi gant div hinienn amplegad ar berzh a ray imboud un organ eus an eil ouzh eben.

gène de structure ◇ **structural gene** ◇ **genenn drevnañ pe drevner** Genenn o reoliñ an urzh ma 'z a an amindrenkennoù da devuniañ evit amparañ ar proteinoù kelligel.

gène HFE ◇ **HFE gene** ◇ **genenn HFE** Genenn o vonegañ ar protein HFE, reoler sugadur an houarn gant an daouzegenn, a zec'han an dargenañ anezhi un darn vras eus an hemokromazioù kentael.

gène mutant ◇ **mutant gene** ◇ **genenn dargenadec** Genenn bet c'hoarvezet ganti un dargenad.

gène régulateur ou **de régulation** ou **de contrôle** ◇ **control gene** ◇ **genenn reoliñ pe reoler** Genenn o reoliñ arc'hwelezezh ar genennoù trevnañ; hervez an dro, e tanze ur goudaver evit skoilhañ pe, en eneb, un apo-iser evit delankañ treuzskrivadur an RNA kannad.

gène suicide ◇ **suicide gene** ◇ **genenn emlazh** Genenn a ebarzher e kelligoù 'zo evit debarañ dezho ur gizidigezh ouzh al lia en araez d'o distrujañ.

(-)**gène**, (-)**genèse**, (-)**génésie**, (-)**géné(-)**, (-)**génie**, (-)**géné(-)**

- *adipogène* behinbar • *adipogenèse, adipogénie* behinbarañ • *aérogène* aerien • *agénésie* anpar • *androgène* androgen, androgeneg • *androgenèse* androgenbarañ, gourevc'haniñ, androgenez • *androgénicité* androgenegezh, androgenusted, androgenelezh • *androgénique* androgenek, androgenus, androgenel • *angiome dysgénétique* angiom mibarel • *cancérogène, carcinogène* kankreiat, kankreiad • *cancérogenèse, carcinogenèse* kankrardarzh • *cardiogénique* kalonien • *céphalo-genèse* pennbarañ • *cétogène* ketonbar • *cétogenèse* ketonbarañ • *choc cardiogénique* bleuz kalonien • *chromogène* liveiat, liveiad • *chromogenèse* livegennbarañ • *cirrhogène* kirroseiat • *cyanogène* dulazus, dulaseiat • *dysgénésie* mibar • *diabéto-gène* diabeteiat, glukozwadusvec'huis

- *facteurs morphogénétiques* parennoù neuztarzhel • *gène alléomorphe* genenn allel, allelenn • *gène responsable* genenn girek
- *kyste bronhogène, kyste bronhogénique* kist bronkezienn • *ontogenèse* unandarzh • *phylogenèse* hildarzh • *uréogenèse* urebarañ
- *xénogénique* allspesadienn.

NOTENN : Er mellad-mañ n'emañ ket an termennoù o tennañ d'an Hiloniezh na d'ar gouennañ; sl. dindan an enmonedoù (-)**généét**(-), (-)géno- & (-)génital.

généraliste, omnipraticien ◇ **general practitioner** ◇ **mezeg hollek, hollegour g. -ion** Mezeg oc'h embreger holl skourroù ar vezekniezh.

géné-

- *administré par voie générale* diounezet dre an hent hollek • *affection générale* anaev hollek • *anesthésiques généraux et locaux* diaraezeroù hollek ha lec'hiek • *cancer généralisé* kankr holleget • *cataplexie générale ou partielle* darsouz hollek pe darnek
- *décoloration des cheveux partielle ou générale* dislivañ ar blev darnel pe hollel • *épilepsie généralisée* droukfell hollek • *état général* stad hollek • *généralisation secondaire* hollegadur eilvedel • *générateur de radiothérapie* ganer skingurañ • *générateur de rayons X* ganer skinoù X • *malformation génératrice d'hémorragies* kammneuziad dec'hanus da wadliñvoù • *médicament générique* lia genadel • *terme générique* termen genadel, anvad genadel, anvad rumm.

généserine ◇ **geneserin** ◇ **genezerin g.** Genalkaloid deveret diwar an ezerin, gantañ an hevelep perzhioù hag ennegadoù (sl. *ésérine*).

génétiq ◇ **genetics** ◇ **Hiloniezh b.** Diskiblezh o plediñ gant an hêrelezh vevedel.

génétiq biochimique ◇ **biochemical genetics** ◇ **hiloniezh vevgimiek** Studi an anadennoù kimiek engwezhiet e gwikefre ar stlenn ez eo ar c'hromozomou ar skor anezhañ.

génétiq formelle ou mendélienne ◇ **formal or mendelian genetics** ◇ **hiloniezh furmel pe vendelat** Studi an doareennoù hêrezhel hag an treuzkas anezho.

génétiq : génie ~ ◇ **genetic engineering** ◇ **Hilouriezh b.** Rann eus an Hiloniezh volekulel o plediñ gant dazverañ ar gen : distagañ hanrannoù kromozom evit o imboudañ ouzh kromozomou all; an hent eo da gevanaozañ ha da genderc'hañ danvezennoù a orin bakteriell (hormonoù, vaksinoù, h.a.) (sl. *biologie moléculaire*).

génétiq : manipulation ~ ◇ **gene manipulation** ◇ **dazverañ ar gen, dazverañ hilourel** Treuzloañ un hanrann gromozom adalek kraoñell ur gellig betek kraoñell ur gellig all en un hinienn all ha dre se treuzkediñ d'ar roadour doareennoù pe arc'hwelioù piauuet gant ar roer (sl. *biologie moléculaire, hybridation, recombinaison génétique*).

génétiq moléculaire ◇ **molecular genetics** ◇ **hiloniezh volekulel** Skourr a 'n Hiloniezh o studiañ, e par ar molekul, dafar treuzkas an doareennoù hêrezhel, al luniadur hag an arc'hwelerezh anezhañ : dasparadur stlennadoù an DNA, an treuzskrivadur anezho war an RNA ha roll hemañ en enaozerezh ar proteinoù.

génétiq physiologique ◇ **physiological genetics** ◇ **hiloniezh vevedourel** Studi furnidigezh ar gen ha gwikefre ar gwerediñ anezho.

génétiq : système de restriction-modification ~ ◇ **restriction modification system** ◇ **reizhiad b. argrennañ-daskemmañ** Teskad enzimoù e piau ar bakteri, o c'hefridi herzel ouzh alouberezh o c'hromozomou gant trenkennoù dezo-oksiribonukleek (DNA) allevek hag o distrujañ; dre gorvoiñ ar galloud a zo gant reoù anezho (*endonukleazoù argrennañ*) da droc'hañ arveleoù an DNA e loadoù resis e tistager tammadoù DNA evit o ensteudañ, *in vitro*, war arveleoù DNA hiniennnoù allspesad (enzimoù all, al *ligazoù*, a dalvez da gensoutañ an tammadoù DNA); dre hevelep dazveradoù ez eus bet imboudet ouzh bakteri 'zo (kolibazhell) genennoù a ra dezho parañ hormonoù (somatostatinn, insulin, somathormon) pe protein a dolz mol uhel (ovalbumin) (sl. *endonucléase*).

génétiq : empreintes ~ ◇ **genetic fingerprinting or DNA fingerprint or fingerprinting or testing or typing or profiling** ◇ **louc'had g. hilel, hillouc'had, louc'had DNA, aelad g. hilel, hilaelad, aelad DNA** Hentenn bivadiñ lezennvezegele o korvoiñ elfennerezh kemalennoù DNA anvegnegus o tont eus leukokit, spergelligoù, h.a.

génétiq : tests ~ ◇ **genetic testing** ◇ **proudoù l. (g.) hilel, hilbrouadoù** Elfennañ ar c'hemalennoù DNA bonegus evit anaout naousterioù bevoniel un hinienn, war-benn dinoñ anaezioù enketat er grouell pe en nevezc'haned, diurnat genennoù kleñvedus enkilek, h.a..

géné-, géno-

- *activité génétique d'un chromosome* gwerederezh hilel ur c'hromozom • *cataracte génétique* ferennlug hilel, ferennlug hêrezhel, ferennlug familhel • *clinodactylie génétiquement déterminée* bizfle hilampegadek • *code génétique* hilvoneg • *conseil génétique* kuzuliañ hiloniel • *constitution génétique* glad hilel • *contrôle génétique de la réponse immunitaire* reolerezh hilel ar respont hangael • *étude des facteurs génétiques* studi ar parennoù hilel • *flux génétique* lanvad hilel, hillanvad • *génotype* genotip • *individus génétiquement identiques* hiniennnoù dezho an un glad hilel, hiniennnoù hilunglad • *matériel génétique* dafar hilel • *patrimoine génétique, patrimoine héréditaire* glad hilel • *pharmacogénétique* liahiloniezh • *informations génétiques* hilstlennadoù • *sonde génétique* hilsont • *trouble génétique* strafuilh hilel.

généculé ◇ **geniculate, genicular** ◇ **1 a-c'hlin 2 glinek aa.** 1 A-geñver gant ur glin, sk. : *kangrenn a-c'hlin* (TA *ganglion geniculum*), kangrenn loet war dalbenn araok glin nervenn an dremm. 2 E stumm ur glin (La. *geniculatus*).

génien, génio- ◇ **genial, genio-** ◇ **elgezh(-)** A-zave d'an elgezh, sk. : *kigenn elgezh-teod* (TA *musculus genioglossus*).

généioplastie ◇ **genioplasty** ◇ **elgezhatelviñ** Ratreañ surjanel, dre unanatelviñ, kolloù steuñvenn an elgezh.

généital ◇ **genital** ◇ **ganadel** aa., **~genel** A-zave d'ar gouennañ, sk. : *organoù genel, karantez c'hanadel*.

(-)**généital**

• *aphtes génitaux* afoù ganadel • *blastème génital* blastem ganadel • *bourgeon génital* nov ganadel • *bourrelet génital* koagenn c'hanadel • *complications urogénitales* rouestlodoù troazhañ-genel • *congénital, inné* ganedigel, enganet • *filière génitale* naoz ar genel • *glande génitale* gwagrenn ar genel, gwagrenn c'hanadel • *localisation génitale* lec'hiadur ganadel • *luxation congénitale* disvellad ganedigel • *organes génitaux* organoù genel, organoù ganadel • *parties génitales* tachadoù ganadel • *sinus urogénital* god troazhañ-genel • *syndrome adiposogénital* azoniad behinganadel • *tempérament génital* tamz ganadel • *voies génitales* forzhioù genel.

généique ◇ **genic** ◇ **1 genennel** aa. **2 hilourel** aa. 1 A-zave d'ar c'henenn, sk. : *erzerc'had genennel* (Gl. *expression génique*). 2 A-zave d'an hilouriezh (sl. *génique : thérapie* ~).

généique : thérapie ~, **généothérapie** ◇ **genotherapy** ◇ **kurañ hilourel, gengurañ** Dedalvout, arnodel evit c'hoazh, kalvezderioù an hilouriezh (*truzkedih ar gen*, Gl. *transfert de gènes*) evit mezegeañ kleñvedoù 'zo; an amkan eo daskemmañ ar glad hilel evit e reolaat.

généitographie ◇ **genitography** ◇ **ganadluniñ** Skinluniñ al lestr goude ensinklañ un demerenn er god troazhañ-genel, imbourc'h renet war un nevezc'haned marrek war-benn ardaoliñ ur rev outañ.

généitosurréal : syndrome ~, **syndrome adrénogénital** ◇ **adrenogenital syndrome** ◇ **azoniad uslounezhganadel** Uc'har c'hwel ar gaenuslounezhenn a orin yoc'hennel, o tizhout ar vaouez hogos bepred; div furn a zeskriver : ar *c'haouerevegezh* (Gl. *pseudo-hermaphrodisme*), o tarvezout er gaezoueregezh, diwar ur c'hortikosur-renalom kuñv, gant merc'hed dezho arouezioù revel kentael hag eilvedel o tennañ da re ar baotred (*androginiezh*); ar *c'houerevegezh uslounezhel* o tarvezout goude ar gaezoueregezh diwar ur c'hortikosurrenalom yud, marvus war verr dermen.

NOTENN : Kemm a lakaer etre an *divrevegezh*, reol gant spesadoù 'zo (sl. *Cestodes*) hag an *urevegezh*, kammneuziadek gant spesadoù all (sl. *hermaphrodisme*).

généodermatologie ◇ **genodermatology** ◇ **hilgroc'henouriezh** b. Studi ar parennoù hêrezhel en anaezioù ar c'hroc'hen.

généodermatose ◇ **genodermatosis** ◇ **hilgroc'henad** g. Kleñved kroc'hen hêrezhel.

généodermatose en cocarde, syndrome de Degos ◇ **Degos syndrome** ◇ **hilgroc'henad kokardennek, azoniad Degos** Plakenoù bras arfont eritem, gourc'hennat en o c'hreiz, o tedeñ afrapadoù, kevret gant plakenoù hiperkeratoz padek en daoulin.

généodermatose scléro-atrophiante et kératodermique des extrémités ◇ **genodermatosis with scleroatrophy and keratosis of the extremities** ◇ **hilgroc'henad sklerozisteñvus ha keratodermek an eizhaennoù** Kleñvel familhel, hêrezhel, trec'hek hag aotozomek, naouus *ent klinikel* dre ur sklerozisteñv kroc'hen strewek ha kemparzhak a 'n daouarn hag ur c'heratoderma leiek a 'r palvoù hag a 'r solioù; *ent hiloniel*, dre vezañs ur c'henenn giriek loet war an un kromozom ha hini ar reizhiad wadel MNS; lies gwech e tredo an anafoù kroc'hen d'un epiteliom gourc'hennelligel hag e stader degouezhioù kankroù flugezel er familhoù tizhet.

généodysplasie ◇ **hereditary dysplasy** ◇ **hilviwe** g., **miwe** g. **hêrezhel** Miwe diwar ur c'henenn giriek.

généodystrophie ◇ **hereditary dystrophy** ◇ **hilvideñv** g., **mideñv** g. **hêrezhel** Mideñv diwar ur c'henenn giriek.

génome ◇ **genome** ◇ **genom** g. Hollad ar gen bezant er c'hromozomoù; hollad an unvezioù hilel a ya d'ober 1) ent strizh, al lod haploidel, bezant er gametoù, eus kromozomoù ur spesad; 2) peurliesañ avat, al lod diploidel, bezant er c'helligoù somatek.

génomique ◇ **genomics** ◇ **genomeg** g. Diskiblezh o plediñ gant studi ar genoù, eleze eus ar gen, ar staladur anezho war ar c'hromozomoù, o roll bevoniell ha gwikefre o arc'hwelerezh.

généoplastie ◇ **genoplasty** ◇ **boc'hatelviñ** Ratreañ surjanel enloezadoù pe disneuziadoù an divjod.

généotoxique ◇ **genotoxic** ◇ **genbistrius** aa. O tarallañ an drenkenn dezoksiribonukleek (DNA) ha drezi ar gen, skor an doarenoù hêrezhel.

génotype ◇ **genotype** ◇ **genotip** g. Glad hilel an hinienn, e dalc'h ar gen bezant e kelligoù ar gouennañ ez eo diwanet anezho (sl. *phénotype*).

généotypique ◇ **genotypic** ◇ **genotipel** aa. A-zave d'ar genotip, sk. : *kleñved genotipel*, eleze hêrezhel.

genou ◇ **knee** ◇ **glin** g. (d. **daoulin**) Parzh eus an ezra traoñ loet etre ar vorzhed hag ar c'har; *kenvell ar glin* (Gl. *articulation du genou*), arz o kevreañ askorn ar vorzhed, ar skin hag ar padelleg.

genouillère ◇ **knee support, kneecap** ◇ **glingenn** g. Amsteudell o c'hronnañ ar glin.

genre ◇ **genus** ◇ **genad** g. Unvez rummañ er Vevoniezh (*rummad*, Gl. *taxon*) loet etre ar *c'herentiad* (Gl. *famille*) a-us, hag ar *spesad* (Gl. *espèce*) a-is.

genu recurvatum ◇ **genu recurvatum** ◇ **glin** g. **rakkromm** Distummadur ar glin, ar vorzhed hag ar c'har oc'h ober ur c'hrom tougn digor war raok, e dianfen disneuziad an eskern pe laoskegezh ar stagelloù.

- genu valgum, genou cagneux** ◇ **genu valgum** ◇ **glin ezkromm, divesker d. (b.) gilgrommelloù** Distummadur an ezel traoñ, ar vorzhed hag ar c'har oc'h ober ur c'horn digor war ziavaez.
- genu varum, jambes arquées** ◇ **genu varum** ◇ **glin enkromm, divesker grommelloù** Distummadur an ezel traoñ, ar vorzhed hag ar c'har oc'h ober ur warenn digor war ziabazh.
- genucubitale : position** ~ ◇ **genucubital position** ◇ **loadur g. daoulin-daouilin** Emlakadur ar c'horf pleget e izili krec'h ha traoñ e doare m'emañ harp war al leur dre an daoulin hag an daouilin.
- genupectorale : position** ~ ◇ **genupectoral position** ◇ **loadur daoulin-brennid** Emlakadur ar c'horf pleget e izili traoñ e doare m'emañ harp war dalenn ar gwele dre an daoulin hag ar brennid, ahel ar c'hef o vezañ a-stou war-raok ha war-draoñ.
- géocancérologie, géocarcinologie** ◇ **geocarcinology** ◇ **douargankroniezh b.** Studi dasparzh douaregorel ar c'hankroù.
- géode** ◇ **geode, punched-out lesion** ◇ **kleuzenn b., enloezad g.** Kavenn gleñvedel kloz e-barzh parenkim un organ.
- géophagie, géophagisme** ◇ **geophagy** ◇ **douarezadezh b.** 1 A-berzh loened 'zo (Lombrikideged), euvriñ douar, mod emvagañ. 2 A-berzh an dud, debriñ douar, meur a rizh anezhañ : *a*) pleustr stuzegezhel deskrivet gant an dudoniourion, *b*) yac'hadur ergemennet gant mezekniezhoù 'zo, *c*) ersavioù e dianlen an naonegezh, stadet e broezioù afrikat pe aziat, *d*) moned bredkleñvedel ; an hanrenoù emvagañ distabiliet gant an douarezadezh a vez e devoud un azoniad naouus dre un amwad ruzisventel, un usvent an avu hag ar felc'h ha, gant ar vugale, un dilerc'hiñ savder-pouez ha kaezouregezh.
- géotaxie, géotactisme** ◇ **geotaxis** ◇ **douardrevn g., douardrevnegezh b.** Delanvad ar ponnerder war an danvez bev : *yaek* eo an douardrevn pa denn ar c'helligoù da loc'hañ a-untu gant dedennerezh an Douar, *nac'hek* pa dennont da loc'hañ a-c'hindu.
- géotrichose** ◇ **geotrichosis** ◇ **geotrikoz g.** Kleñved diwar ur foue saprofitek a 'r genad *Geotrichum* a c'hell mont kleñvedus e tro an hangaeastaliñ (sl. *bactéries opportunistes, sida*).
- gerçures, crevasses** ◇ **fissures** ◇ **spinac'h s.** Skarroù bihan o tizhout an epiderm hag un darn eus an derm, en daouarn, en divweuz hag er begoù bronn.
- gériatrie** ◇ **geriatrics** ◇ **Henadouriezh b.** Skourr a 'r Vezekniezh o plediñ gant kleñvedoù an dud kozh.
- germain** ◇ **sib, sibling** ◇ **kompez aa.** Gant an ere kerentiezh nesañ, eleze etre breudeur ha/pe c'hoarezed dezho an un tad ha mamm, sk. : *div c'hoar gompez* (a-gevenep da *kenwad, diavamm*, sl. *consanguinité, utérin*) ; *kendirvi gompez* (Gl. *cousins germains*) a reer eus tud a zo o c'herent a-getep breudeur ha/pe c'hoarezed.
- 1 germe, ébauche 2 germe, microbe** ◇ **germ** ◇ **1 eginenn b. 2 hadenn b.** 1 Furm rizhellel un organ, sk. : *eginenn dant*. 2 Garvev e kement m'en deseller evel ur gwezher kleñved (sl. *stérilisation 1*).
- germe de sortie** ◇ **hadenn diantek** Garvev dizoloet en ur bevedeg da geñver ur pore, evitañ da vezañ estren d'ar c'hleñved o ren.
- germen** ◇ **germ cells** ◇ **germen g.** Gwiad ganadel a-gevenep d'ar pep all eus ar bevedeg pe *soma*.
- germinales : cellules** ~ ◇ **germinal cells** ◇ **bongelligoù revel** Kelligoù rizhellel eus ar gwriad ganadel.
- gérodermie** ◇ **geroderma** ◇ **geroderma g.** Neuz kozhiadel a 'r c'hroc'hen.
- gérodermie génito-dystrophique** ◇ **geroderma** ◇ **geroderma ganadel mideañvel** Anaez familhel, stadet er paotr yaouank, naouus dre ur gozhiadegezh kentrat (kroc'hen sec'h ha laosk, moalded), andiorre an organoù ganadel hag an eilarouñezhoù revel, ur rakwar hag usteñv an eizhaennoù o tennañ d'ar geurvlouezhegezh.
- géromorphisme cutané, gérodermie** ◇ **cutaneous geromorphism** ◇ **heneuziadezh b. kroc'hen** Anaez o tizhout ar baotred, naouus dre ur strafuilh teñvel a 'r c'hroc'hen, hemañ o vont sec'h, roufennek, laosk, kevret gant an dizogvanegezh hag un divig kefredel.
- gérontologie** ◇ **gerontology** ◇ **Henadoniezh b.** Studi doareoù bonan ha kleñvedel an dud aet war an oad.
- gérontopsychiatrie** ◇ **geropsychiatry** ◇ **Bredvezekniezh b. an henaded, Bredhenadouriezh b.** Skourr a 'r Vredvezekniezh o plediñ gant kleñvedoù an dud kozh.
- Gerstmann : syndrome de** ~ ◇ **Gerstmann's syndrome** ◇ **azoniad Gerstmann** Azoniad nerval naouus, *ent neuziadurel* dre un anaf e pluskenn an dolbezenn gitem kleiz, *ent klinikel* dre un andenaoud a 'r bizied, un anriñv, un anskriv ha strafuilhoù goulun an emgorf (kemmesk an tu kleiz hag an tu dehou), a-wechoù ivez un ankomz hag ul ledangwel unsko.
- gestagène** ◇ **gestagenic** ◇ **bec'haraezus aa.** Emsavus da emdroadur ar vec'hiegi.
- gestaltisme, Gestalttheorie** ◇ **gestaltism** ◇ **emframouriezh b., gestaltouriezh b., Gestalttheorie b.** Damkaniezh o lakaat e vez bepred dec'havalet an devoudoù (merzhadoù, derc'hadoù, lavaradoù, h.a.) evel engwezhiet ebarzh unvezioù bloc'hel, an emframmoù, a ro dezho o zalvoudegezh.
- gestation** ◇ **gestation** ◇ **1 bec'hiegi b. 2 bec'hiegevezh g.** 1 Stad ur barez o tougen dedaolad an engehentañ. 2 Padvezh ar vec'hiegi (sl. *âge gestationnel, conceptus, grossesse*).
- geste** ◇ **-gravida** ◇ **-bec'h aa.** Lostger o verkañ niverenn ur vec'hiegi, sk. : *kentabec'h* (Gl. *primigeste*).
- giardiase, giardiase, lambliaze** ◇ **giardiasis** ◇ **giardiaz g.** Anaez devoudet gant ur brotozoenn oc'h arvevata bouzellenn voan an den (*Giardia lamblia*), naouus dre un darc'hoal gant oulennoù toazek, asikted, treutadur hag a-wechoù bestlgellenno.

gibbosité ◇ **gibbosity** ◇ **tortenn** b. Krommadur ezreol a 'l livenn gein, erzerc'h dre ur balir eus kavenn ar brusik, sk. : *tortenn gleñved Pott* (Gl. *gibbosité pottique*).

Giedion et Scheidegger : syndrome de ~ ◇ **Giedion Scheidegger syndrome** ◇ **azoniad Giedion Scheidegger** Kleñved dre negezh an hangae dourennel, naouus ent klinikel dre an amzifenn ouzhañ poreadoù ar benvegadoù anañ ha koazhañ; izelaet eo feur gwad an IgA hag an IgM, tra ma 'z eo reol pe uhelaet feur an IgG ha ma 'z eo reol an hangae kelligel.

gigantisme ◇ **gigantism** ◇ **keuregezh** b. Anaev o tarvezout er gaezouegezh, naouus dre usvent ar savder; an un kleñved eo hag ar geurvelchegezh, e dalc'h adenom eoizofil ar rakgougorfenn : pa zeraou ar c'hleñved goude soutadur an talpennoù ez erzerc'h an usvent en eizhaennoù hepken (sl. *acromégalie*).

gigantisme cérébral ◇ **cerebral gigantism** ◇ **keurempennegezh** b. Azoniad stadet diwar ar c'hanedigezh, naouus dre ur c'hresk savder-pouez re herrek, hep strafuilh enborc'hadel; dre gammneuziadoù ar c'hlopenn hag an dremm (klopenn ec'honek hag argouc'h, tal ledan ha bolzennek, gwaregoù abrant balirek), bolc'hadur ar c'hambroù empenn; dre ul labanded hag, a-wechoù, glizi.

gigantoblastes ◇ **gigantoblasts** ◇ **gigantoblast** s. Eritroblast dreist 10 µm ment.

gingivectomie, ulectomie ◇ **gingivectomy** ◇ **munsunezvenañ** Dilemel surjaniel gwriad a 'r vunsun.

gingivite, ulite ◇ **gingivitis, ulitis** ◇ **munsunfo** g. Tanijenn ar vunsun.

gingivoplastie ◇ **gingivoplasty** ◇ **munsunatelviñ** Azneuziañ surjaniel ar vunsun.

gingivorragie ◇ **ulorrhagia** ◇ **munsunwadañ** Gwadiñvañ ar vunsun.

gingivostomatite ◇ **gingivostomatitis** ◇ **munsungenaoufo** g. Tanijenn ar vunsun ha glaourgennoù all a 'r genoù.

ginseng ◇ **ginseng** ◇ **ginseng** g. Plantenn reteraziat diounezet e wrizioù evel usreer.

GIP ◇ **GIP** ◇ **GIP** g. (Tallzherennoù Sz. *gastric inhibitory peptid*, Br. *peptid kreuzisvorc'hus*) Peptid bezant e kelligoù gwagrennel an daouzegenn hag ar yunegenn, o heudañ borc'hadur trenkek ha peptek ha fiñverezh ar stomok, o kentraouiñ borc'hadurioù ar pervez ha borc'herezh an insulin hag ar glukagon.

glabelle ◇ **glabella, intercilium** ◇ (**bos g. ar**) **bailh g., dibanenn** b. Bos an askorn tal loet etre ar gwaregoù abrant.

glaçon : signe du ~ ◇ ◇ **arouez** b. **ar skornenn** Astos ouzhañ an teuta eus un dolzenn (an avu, ar felc'h, ur yoc'henn) war neuñv e-barzh un hogennad torliñvenn (sl. *choc en retour*).

glaire ◇ **glairy mucus** ◇ **sklerenn** b. Liñvenn diliv, neudennek evel ar gwenn vi, kantalc'hekok'h eget ar glaour, borc'het a-wechoù gant ar glaourgennoù.

glând ◇ **glans** ◇ **mezenn** b. Eizhaenn rez, arront ha bazhoulek an ellig hag ar c'halc'h.

glande ◇ **gland** ◇ **gwagrenn** b. Organ kelligoù epitelal ouzhañ e ober, e arc'hwel parañ borc'hadennoù; kemm a lakaer etre ar gwagrennoù ezvorc'hañ (Gl. *glandes exocrines*), o tegorzhañ o dedaolad e-maez ar bevedeg pe e-barzh ar ganol vezhur, hag ar gwagrennoù enborc'hañ (Gl. *glandes endocrines*), o tilaoskiñ o dedaolad er gwad (ar skoedenn, an uslounezhenn); kemmesk eo reoù 'zo (an avu, ar gonadoù, an ilgreiz) (sl. *apocrine, eccrine, holocrine, hormone, mérocrine*).

glaucome ◇ **glaucoma** ◇ **glaokom** g. Kleñved al lagad, naouus dre uswask al liñvenn enboullet dreist 20 mm Hg, o tec'han un nervernaoued gweledel lec'hiet e par ar vegenn; dianlen eo da isver an dourenn lagad a-dreuz d'ar rouedad kourzadek loet en ank kanevedenn-kornsae; hervez stad hemañ e tiforc'her : 1) ar *g. korn digor* (Gl. *g. à angle ouvert*) pe *g. henek eeun* (Gl. *g. chronique simple*), gevennet hepken gantañ diver an dourenn, anaev paot, hêrezhel, da azonoù dezhañ, ouzhpenn an uswask enboullet, dislivad ha pukadur ar vegenn, strishadur ar gwelvaez, o tedreiñ gorrek ha manguñv etrezek an dallentez ma n'en oberataer ket; 2) ar *g. korn serr* (Gl. *g. à angle fermé*) ma vez kempeget ar ganevedenn hag ar gornsae hag, a se, dic'hallus assagadur an dourenn, naouus dre gaojadoù lemm laurioù feuls el lagad, heugennoù, c'hweladoù, gweled morennek, luc'hgag, mabusvoll, ruzder ha kaleted "e kanetenn wer" ar voull lagad; ur wezhiadenn difrae hepken a c'hell gwarediñ ar gweled.

glaucome malin ◇ **malignant glaucoma** ◇ **glaokom yud** Rouestlad grevus oberatadenn ar glaokom : e-lec'h tremen er gambr arak, e taspuñ an dourenn lagad a-dreñv ar ferenn pe zoken a-dreñv un dispegadur eus ar gwereg.

glénoïdite ◇ **osteitis of the glenoid cavity** ◇ **pezelfo** g. Askormfo pezel ar planken skoa.

glioblastome ◇ **glioblastoma** ◇ **glioblastom** g. Seurtad gliom ennañ gwriad nerval er stad rizhellek ha dezhañ un dedro yud.

glioblastose cérébrale diffuse ◇ **glioblastosis cerebri** ◇ **glioblastoz empenn strewek** Neridigezh ledan gwriad ar gliá, treweek ar c'helligoù anezhañ, kuñv peurliesañ.

gliome ◇ **glioma** ◇ **gliom** g. Yoc'henn gentael an nerved kreiz evodet diwar elfennoù kelligel diseurt a 'n neuroglia; kuñv reoù anezho (astrokitom, oligodendrokitom, ependimom), en ervez da zedreiñ e yoc'hennoù yud; yud a-gentizh reoù all (glioblastom).

gliose ◇ **gliosis** ◇ **glioz** g. Neridigezh rouedad an neuroglia.

glissé ◇ **glide** ◇ **linkañ** Kalvezder leuñviñ ar gwriad kenglenel, anezhañ donrimiañ gorrek diwar-bouez beg ar biz kreiz (sl. *pression glissée*).

glissement : syndrome de ~ ◇ **going off syndrome, failure-to-thrive syndrome** ◇ **azoniad ar c'holl sont** Darallad real-ezh gant ar gozhiaded, anezhañ displeberadur ar c'hefrediñ, anilboued, angremm, andeur, o c'hoarvezout alies da heul ur c'hleñved pe un darvoud, fall e erdebad.

- globe corné** ◇ **epithelial pearl** ◇ **perlezenn** u. **epitelel** Tachad kreiz keratinaet an epiteliomou epidermoidel gourc'hennelligel.
- globe de sûreté** ◇ ◇ **pellenn** b. **surentez** Tolzenn galet, boulek, merzhet pa deutaer kof ar vaouez nevezwilioudet, didennet he c'hroz en-dro goude ezvoutañ ar gweleskar; an arouez eo emañ an eskoradourez salv diouzh riskl ar gwadliñvañ dianwilioud.
- globe vésical** ◇ **full bladder, bladder distension** ◇ **c'hwezhihell bellennek** Tolzenn galet a deutaer e kreiz ar rannbarzh gougreuzel pa vez dardennet ar c'hwezhihell.
- globuline** ◇ **globulin** ◇ **globulin** g. Anvad rumm oc'h arouezañ un stroll holoproteinou dezho un tolz mol dreist 150 000; o rannañ a reer etre an *euglobulinoù*, andileizh en dour pur, hezileizh a-ziavesk kevionennoù, hag ar *pseudoglobulinoù*, hezileizh en dour pur; dre an tredannizhañ e tispartier, hervez tizhou dilec'hiañ war zigresk, lies rann : α_1 , α_2 , β_1 , β_2 , γ ; d'ober an euglobulinoù ez a dreist holl β - ha γ -globulinoù hag ivez blivaerioù ar fibrinloezañ (plasminogen), ar barenn V, ar barenn enephefiolek A hag, e feurioù izeloc'h, ar fibrinogen, ar barenn VII ha louc'hadoù a 'r barenn enephefiolek B; d'ober ar pseudoglobulinoù ez a α -globulinoù dreist holl hag un nebeut γ -globulinoù — ar pennañ globulinoù gant an den eo fibrinogen ar plasma, ar seromglobulinoù, an ovoglobulin, al laktoglobulin hag an tireoglobulin.
- globulinémie** ◇ **globulinaemia** ◇ **gwadvec'h** g. **globulin, globulinwadvec'h** Feur ar globulinoù er gwadvez.
- globulinurie** ◇ **globulinuria** ◇ **1 troazhc'hlobulinegezh** b. **2 troazhvec'h** g. **globulin, globulindroazhvec'h** 1 Bezañs globulin en troazh. 2 Feur ar globulin en troazh.
- glomectomie** ◇ **glomectomy** ◇ **bloueezvenañ** Dilemel surjanel ar bloue karotidel.
- glomérule rénal** ◇ **glomerulus** ◇ **bloueig** g. -où (a 'l lounezh) Goustell vihan gorrwazhied talmerel gronnet gant ur golo, *koc'henn Bowman* (Gl. *capsule de Bowman*), parzh deroù an *nefron* (Gl. *néphron*), unvez neuziadurel hag arc'hwelel al lounezh; da heul ar *bloueig* e teu ar *bibell nezek* (Gl. *tube contourné proximal*), rann gentañ *tuellenn al lounezh* (Gl. *tubule rénal* pe *tube urinifère*).
- glomérulographie** ◇ **glomerulography** ◇ **bloueigluniñ** Skinluniñ ar bloueigoù dre un talmerennluniñ uheloc.
- glomérulonéphrite aiguë** ◇ **acute glomerulonephritis** ◇ **bloueigfo** g. **lemm** Tanijenn bloueigoù al lounezh o tarvezout peurliesañ da heul ur pored a 'r fric'hargadenn strepokokel, viruzel, foueel, naouus dre un ec'hodiñ troazh berrek, strafuilhet, teñval, ennañ proteinoù, hemati ha rolledoù, dre ar skuizhder, dre ar welved, ar goulivnoù, an uswask, ur falladur kalon hag ur gwadusvec'h urea leiek; o tedreñ gorrek etrezek ar pare, a-wechoù goude mizvezhioù.
- glomérulonéphrite chronique** ◇ **chronic glomerulonephritis** ◇ **bloueigfo henek** Anvad rumm al lounezhadoù boutin etrezo sez an anafoù er bloueig hag un dedro gorrek ha direolek etrezek ur skorted lounezh marvel; hogos bepred e stader ur wikefre hangaeel e rezh ar gouzeidiñ eus hangaegemplezhioù amredat, dibaotoc'h a wech e rezh kelligpistruisted antikorfoù antikennenn.
- glomérulonéphrite extracapillaire ou maligne ou aiguë anurique ou aiguë nécrasante ou à croissants** ◇ **extracapillary glomerulonephritis** ◇ **bloueigfo ezkorwazhiedel** pe **yud** pe **lemm antroazhel** pe **lemm marvennus, bloueigfo kreskennoù** Seurtad dibaot ha grevus bloueigfo, naouus *ent clinique*, dre un dedro dindan un nebeut devezhioù etrezek ar skorted lounezh antroazhel; *ent wiadoniell*, dre an neridigezh e rezh kreskennoù eus kelligoù a orin hangaeel en dro d'an doupen, o tedreñ etrezek ar skleroz; *dre arbennoù diseurt* : antikorfoù antidiaskennenn (azoniad Goodpasture), korwazhiedfo (granulomatoz Wegener), gouzedoù immunoglobulinoù (lupuz, enkalonennfo Osler), h.a.
- glomérulopathie, néphropathie glomérulaire** ◇ **glomerulopathy** ◇ **bloueigad** g., **lounezhad** b. **vloueigel** Anvad rumm evit ar c'hlevedoù lounezh o tizhout ar bloueigoù, termenoù a denn da zistroadañ Gl. *glomérulite, glomérulonéphrite*.
- glomique** : **tumeur** ~, **glomangiome** ◇ **glomus tumor, glomangioma** ◇ **yoc'henn** b. **vloueek, glomangiom** g. Angiom bihan e rezh un nozelenn loet en derm pe e gwriad kellaouek endan-groc'hen an eizhaennoù, laurus kenan (goriazoù), ouzh e ober dasforzhadoù korwazhiedel ha gwiennoù nerved.
- glomus carotidien** ◇ **glomus caroticum** ◇ **bloue** g. **karotidel** Korfig gwazhiedet puilh loet e forc'h ar garotidenn, ennañ kimifraouvaoù oc'h arouleviañ ar gwadvec'h oksigen dre hantererezh an analañ.
- glomus jugulaire** ◇ **glomus jugulare** ◇ **bloue kerc'hennel** Furmadur gwazhiednerved bihan loet etre ognonenn grec'h gwazhienn ar c'herc'henn ha speur askorn ar poull a-gerc'henn, ennañ kimifraouvaoù.
- glomus neurovasculaire** ◇ **glomus body, cutaneous glomus, neuromyoarterial glomus** ◇ **bloue gwazhiednerved** Dasforzhad talmerenn-gwazhienn korrgreskerel puilh ennañ ar gwiennoù kaherel levn ha nerved, loet dreist holl e kroc'hen ar bizied daouam ha treid.
- glossalgie** ◇ **glossalgia** ◇ **teodost** b. Anvad rumm evit al laurioù teod (sl. *glossodynie*).
- glossite** ◇ **glossitis** ◇ **teodfo** g. Anvad rumm tanijennoù an teod, sk. : *teodfo disvegennaouus* (Gl. *glossite décapillante*), anaf eus eil prantad ar sifiliz, anezhañ ur gourc'hennadur epitelel dre blakennoù kantet.
- glossite exfoliatrice marginée** ◇ **geographic tongue** ◇ **teodfo dispelius gwrimennek** Anaez glaourgenn an teod, ansifilitek, hêrezhel ha kuñv, naouus dre blakennoù mideñvek gourc'hennus, bonnet diouzh an tu ma emledont dre un andell arwenn kelc'hennek.
- glossocèle** ◇ **glossocèle** ◇ **teodogad** g. Arvalirad an teod e-maez ar genoù dre arbenn pe arbenn (tanijenn, yoc'henn).
- glossodynie (essentielle), symptôme de la langue brûlante** ◇ **glossodynia** ◇ **teodwa** g., **teod losk** Laur berius e rezh loskadurezh sezet en teod, pe strewek, pe kantet en ur poent, pe c'hoazh astennet da lodennoù all eus ar genoù (munsun,

stavn, divweuz, komz a reer neuze eus *genaouwa*, Gl. *stomatodynie*), hep azon all, o reuziañ e-doug mizvezhioù, hep ehan pe dre resmiadoù o padout lies eurvezh bemdez; anaez o tizhout dreist holl ar merc'hed etre 40 ha 60 vloaz; an efedusañ outañ eo prederiadurioù ar gouvid.

glossolalie ◇ **glossolalia** ◇ **amdeodiñ** Eztaoliñ deluzadoù dezho neuz ul lavar, estren avat da gement yezh 'zo, devoud stadet 1) er Gevrinadezh, m'en deskriver evel "an teodyezhañ dreistintet o tont gant ar gevrynaded e deroù ar goursav", 2) er Vezekniezh, lavar forjet gant psikozeion 'zo diwar-bouez stenc'herioù, derhebadoù, elfennoù geriadurel ha kevreadurel diframmet diouzh ar yezhoù.

glossoptose ◇ **glossoptosis** ◇ **teodislink** g. Gant ar vagadell, kouezh an teod war-dreñv, o wintañ an ankoue hag o strishaat ar c'hargadenn, darvoud a ziaesa al lonkañ.

glossotomie ◇ **glossotomy** ◇ **teodezvenañ** Ambidañ an teod.

glotte ◇ **glottis** ◇ **tarzh** g. Hoskad krenn kavenn ar c'harloc'henn, sez ar mouezhparañ, loet dindan ar rakkambr, etre ribl rez plegoù ar vouezh ha balegoù ar vouezh a 'r picheregoù.

glucagon ◇ **glucagon** ◇ **glukagon** g. Hormon polipeptidek borc'het gant kelligoù α_2 enezigoù Langherans an ilgreiz, glukoz-wadusvec'h ius, gourzhaler d'an insulin, o kendaoliñ da arouleviañ borc'herezh an insulin; degerc'het e vez gant an avu ma vliva ar glikogenloezañ hag al lipidloezañ; e ziounit a reer dre an hent enkaherel ouzh darvoudoù ar gwadisvec'h glukoz.

glucagonome ◇ **glucagonoma** ◇ **glukagonom** g. Yoc'henn dibaot evodet diwar ar c'helligoù α_2 eus enezigoù Langherans, naouus dre un dermatoz liessstumm, eritematus-gloevennek o sezañ en eizhaennoù hag en dro d'an igorennoù naturel.

glucide ◇ **glucide** ◇ **glukid** s. & g. Anvad rumm evit an *ozioù* (Gl. *oses*), sukrennoù eeun, hag an *ozidoù* (Gl. *osides*) : *holozidoù*, *poliholozidoù*, *heterozidoù*; er bevion ez amparont ur c'hadav hag ur vammenn c'hremm hag ez eont da gedrann en trenkennoù nukleek hag e koc'hennoù ar c'helligoù struzhel hag ar bakteri; kediañ a reont alies ouzh al lipid hag ar protid.

glucidogramme, **glucoprotéinogramme** ◇ **glucoproteino-gram** ◇ **glukidrestrad** g., **glukoproteinrestrad** g. Delun pe kevregad o terc'hennañ kenfeur pep hini eus ar glukoproteinoù bezant en ul liñvenn vevel, dispartiet dre dredannizhañ war baper ha dinoet dre araerz livuzennoù arbennik.

glucose ◇ **glucose** ◇ **glukoz** g. Sukrenn eeun, anezhi un heksoz (Gl. *hexose*), eleze c'hwech atomenn garbon oc'h ober he molekul; bezant eo an D-glukoz pe *dekstroz* (Gl. *dextrose*) er frouezh hag er gwad, pennañ mammenn c'hremm ar bevedeg eo.

glucosé ◇ **glucoséd** ◇ **glukozek** aa. Gant glukoz dileizhet ennañ, sk. : *dileizhad glukozek* (Gl. *soluté glucosé*).

glucoformateur, **glycogénique** ◇ **glycogenic** ◇ **glukoseiat** aa. O c'heneal glukoz (sl. *glycogène* : *maladie* ~).

glutamine ◇ **glutamine** ◇ **glutamin** g. Amindrenkenn bevanret, kedrann a 'r proteinoù, monoamid an drenkenn c'hlutamek ha sammer amoniak.

glutamique : **acide** ~ ◇ **glutamic acid** ◇ **trenkenn b. c'hlutamek** Amindrenkenn bevanret, kedrann a 'r proteinoù, diaraoger ar glutamin.

glutathion ◇ **glutathione** ◇ **glutation** g. Tripeptid, ouzh e ober kistein, trenkenn c'hlutamek ha glikin; aes gantañ ar monedone etre e furmoù oksidet ha direct, alese e roll pouezus er bevedeg evel sammer hidrogen.

glutéal, **fessier** ◇ **gluteal** ◇ **peñs**, **peñsel** aa. A-zave d'ar feskenn, sk. : *kigenn vrasañ ar peñs*, *musculus gluteus maximus*, TA 1998 Gl. *muscle grand glutéal* (PNA 1950 Gl. *muscle grand fessier*).

gluten ◇ **gluten** ◇ **gluten** g. Danvezenn brotidek kaotek bezant e greun an edeier, puilh ar glutamin er protein deveret anezhañ dre zourrannañ.

glycémie ◇ **glycaemia** ◇ **gwadvec'h g. glukoz**, **glukozwadvec'h** g. Feur ar glukoz er gwad; er gouzrec'h bonan war yun e vez ar g. etre 3,9 ha 5,6 mmol/l (etre 0,50 ha 1,10 g/l); dindan 3,9 mmol/l e komzer eus *gwadisvec'h glukoz*, *glukozwadusvec'h* (Gl. *hypoglycémie*), dreist 5,6 mmol/l eus *gwadusvec'h glukoz*, *glukozwadusvec'h* (Gl. *hyperglycémie*) (sl. *diabète sucré*).

glycéré, **glycérolé** ◇ **glycerite** ◇ **glikerolad** g. Angevezh apotikel damsonnel ennañ da ambrougenn ar glikerol pe ar glikerolad ampez (gel ampez er glikerol) a arloer ouzh ar c'hroc'henn evel distanuzenn.

glycéríde, **graisse neutre** ◇ **glyceride** ◇ **glikerid** g. Lipidenn o tisoc'h eus esteraat un, div pe deir soaz alkoool a 'r glikerol dre un drenkenn druz, alese ar vezañs eus tri seurtad anezhi, a-getep ar *monoglikerid*, an *diglikerid* hag an *triglikerid*; etre 0,5 hag 1,5 g/l emañ ar gwadvec'h reol triglikerid (sl. *hyperlipémie*).

glycérídemie ◇ **glyceridaemia** ◇ **gwadvec'h glikerid**, **glikeridwadvec'h** Feur ar glikeridoù er gwad; termen arveret a-wechoù e-lec'h *triglycérídemie*.

glycérine, **glycérol** ◇ **glycerin(e)** ◇ **glikerol** g. Trialkool e zelun $\text{CH}_2\text{OH-CHOH-CH}_2\text{OH}$ o tisoc'h eus dourrannadur ar glikeridoù, adkenderc'had diwar oberierezh ar soavon, liñvenn diliv, dic'hwezh, sirosek, dourhevesk e pep kenfeur, danvezet evel lenkruzenn, laoskaer, laoskuzenn hag, el liaerezh, evel ambrougenn.

glycine, **glycolle** ◇ **glycine** ◇ **glikin** g. Amindrenkenn alifatek bevanret, kedrann a 'r proteinoù, diaraoger ar porfirinoù hag an halioù bestlel.

1 glycinurie **2 glycinurie**, **hyperglycinurie** ◇ **1 glycinuria** **2 hyperglycinuria** ◇ **1 troazhc'hlikinegezh** b. **2 glikindroazh-usvec'h** g. 1 Bezañs ar glikin en troazh. 2 Kleñved hêrezhel naouus, ent *vevoniel*, dre feur reñverek ar glikin en troazh hep

reñver glikin er gwad, e dianlen leiaat dassugañ tuellennel ar glikin, ent *klinikel*, dre ur c'hrouanegezh adfeilhus.

NOTENN : Arveret e vez an termen Gl. *hyperglycinurie* gwech da envel un azon eus ar c'hleñved Gl. *glycinurie*, gwech evel anvad ur c'hleñved hêrezhel all, anvet ivez ar *glikinoz*, naouus dre ur reñver gourfaot glikin er gwad (*glikinwadusvec'h*, Gl. *hyperglycinémie*) hag en troazh.

glycocalyx ◇ **glycocalyx** ◇ **glikokaliks** g. Goload stirek gwareziñ loet war c'horre diavaez kennenn ar gellig, amparet gant glikolipid hag o tougen antigenoù gorre.

glycogénase ◇ **glycogenase** ◇ **glikogenaz** g. Enzim bezant e kelligoù an avu, en araez da dreiñ ar glikogen e glukoz pa vez blivaet gant ur barenn nerval pe hormonel.

glycogène ◇ **glycogen** ◇ **glikogen** g. Glukid bezant e lies organ : kigennoù, torzhienn, h.a. ; en avu ez ampar ur c'hadavad en araez da dreiñ e glukoz hervez ezhommoù ar bevedeg ; ur polisakarid eo, o c'hoarvezout a volekul glukoz etrezo ereoù α1-4 ; outañ ur bleñchennadur skoultrennoù krafet dre ereoù α1-6.

glycogénésie, **glycogénie**, **glycogénese**, **glycogénogenèse** ◇ **glycogenesis** ◇ **glikogenbarañ** Furmiñ ar glikogen diwar sukrennoù eeun, o c'hoarvezout en avu pergen.

glycogénie, **glycogénese**, **glucogénese** ◇ **glycogenesis** ◇ **glukozparañ** Furmiñ ar glukoz diwar ar glikogen bezant en avu. **glycogénique** ◇ **glycogenic** ◇ **glukozparañ**, **glukozparus** aa. O c'henel ar glukoz.

glycogénique : **maladie** ~, **glycogénose**, **polycorie glycogénique** ◇ **glycogenosis** ◇ **glikogenoz** g. Anvad rumm ar c'hleñvedoù hêrezhel diwar ezvezañs pe ezreolder unan eus an enzimoù o tasperzhiañ e kennevid ar glikogen.

glycogénolytique ◇ **glycogenolytic** ◇ **glukogenloezañ**, **glikogenloezus** Gant ar perzh leiaat tenor ar glikogen en avu.

glycogénopexie ◇ **glycogenopexy** ◇ **glikogenlenañ** Daspugn ha derc'hel ar glikogen en avu.

glycolipide ◇ **glycolipid** ◇ **glikolipid** g. Lipid a zo glukoz en e volekul.

glycolyse ◇ **glycolysis** ◇ **glukozloezañ** Leiaat pe steuziañ ar glukoz bezant e gwiadoù pe e liñvennoù ar bevedeg.

glycopeptides ◇ **glycopeptides** ◇ **glikopeptideier** l. (**glikopeptid** g.) Kerentiad bevastalerioù, en o zouez ar vankomikinañ hag an teikoplaninañ.

glycopexie ◇ **glycopexis** ◇ **glukozlenañ** Daspugn ha derc'hel ar glukoz er gwiadoù.

glycoprotéine, **glucoprotéine** ◇ **glycoprotein** ◇ **glikoprotein** g. Anvad rumm ar proteinoù kemplezh o tisoc'h eus an eren etre ur protein hag un ozid, re anezho o vezañ nesoc'h d'ar glukid : ar *mukopolisakaridoù*, re all d'ar proteinoù : ar *mukoproteinoù*, bezant e plasma ar gwad.

glycorachie ◇ **glycorrhachia** ◇ **keinvec'h** g. **glukoz**, **glukozkeinvec'h** g. Feur glukoz el livenn benn-kein, reol etre 2,8 ha 4,2 mmol/l.

glycorégulation ◇ **glycoregulation** ◇ **glukozarouleviañ** Hollad ar gwikefreoù kemplezh oc'h arwastadiñ gwadvec'h ar glukoz, o tasperzhiañ enno an avu, an ilgreiz hag ar gwagrennoù enborc'hañ all, ar c'higennoù hag ar reizhiad nerval.

glycostase ◇ **glycostasis** ◇ **glikogendalc'h** pao. & g. Arwastadiñ kadavad ar glikogen en avu hag er c'higennoù.

glycosurie ◇ **glycosuria** ◇ **1 troazhc'hlukozegezh** **2 troazhvec'h** g. **glukoz**, **glukoztroazhvec'h** g. 1 Bezañs glukoz en troazh. 2 Feur glukoz en troazh.

glycosylation, **glycation** ◇ **glycosylation**, **glycation** ◇ **glikosilañ**, **glikañ** Lenañ anenzimatek aneitrous ur molekul glukoz ouzh ur molekul protid pe lipid (sl. *hémoglobine glycosylée*).

gnathologie, **occlusodontie** ◇ **gnathology** ◇ **keharzouriezh** b. Rann eus an dentouriezh o plediñ gant ar benvegad chaokat.

gnosie ◇ **gnosia**, **gnosis** ◇ **denaoud** g. Galloud da hennadiñ un ergorenn dre ur skiantenn (sl. *agnosie*).

gnotobiotique ◇ **1 gnotobiotic** **2 gnotobiotics** ◇ **1 naouc'harvevek** aa. **2 naouc'harvevouriezh** b. 1 A-zivout al loened imbourc'hva bet hennadet o garveveg pervez. 2 Diskiblezh o plediñ gant al loened naouc'harvevek.

godet ◇ **pitting** ◇ **pukad** g. Enlouc'h lezet gant beg ar biz war amwiskad ur parzh korf goulfiñvek.

goitre, **strume** ◇ **goitre**, **goiter**, **struma** ◇ **pennsac'h** g. -où Usteñv strewek ha kuñv ar skoedenn ; a-wechoù, dre astenn ster, e lakaer an anvad war nep koeñvenn eus ar skoedenn hag e komzer eus *pennsac'h kankrek*, *torzhellek*, *kistek*, h.a.

goitre aberrant ◇ **aberrant goitre** ◇ **pennsac'h gouskoev** Pennsac'h evodet diwar un adskoedenn, o tarvezout sezañ er poullkreiz, war gostez ar gouzoug pe e diaz an teod.

goitre aigu ou **épidémique** ◇ **acute goitre** ◇ **pennsac'h lemm** pe **darreuziat** Koeñvadur ar skoedenn o tarvezout e rezh darreuziadoù bihan er broezioù ma revez ar pennsac'h broreuziat, o steuziañ buan pa zivro ar glañvourion.

goitre endémique ◇ **endemic goitre**, **goitre with hypothyroidism** ◇ **pennsac'h broreuziat**, **pennsac'h skoedisvorc'h-el** Kleñved o tarvezout e rannbarzhioù meneziek e dianlen negezh an iod, naouus dre ur pennsac'h ha strafuilhoù korfel ha kefredel ; pa dizh ar vugale e kemer furm ar *gretiniezh* (sl. *crétinisme*, *myxœdème*).

goitre basedowifiié ou **basedowifiant** ◇ ◇ **pennsac'h bazdovekaet** Dinodadur ur c'hleñved Basedow war ur pennsac'h rakveziat.

goitre multinodulaire ◇ **multinodular goitre** ◇ **pennsac'h liesnozelek** Pennsac'h eeun, nozelennoù strewet ennañ, en ervez da zedreñ e *p. l. pistriell*; warnañ arouezioù bazdovegezh leiek.

goitreux ◇ **goitrous** ◇ **1 pennsac'hek** aa. **2 pennsac'heg** g. **-eion** 1 Gant ur pennsac'h. 2 Gouziviad ar pennsac'h.

NOTENN : Diouerin a ra an adanv gallek kevatal d'an adanv Br. *pennsac'hel* "a-zave d'ar pennsac'h".

goitrigène ◇ **goitrigenic** ◇ **pennsac'heiat** aa. O tevoudañ ar pennsac'h.

Golfe : syndrome de la guerre du ~ ◇ **Gulf war syndrome** ◇ **azoniad brezel ar Pleg Mor** Azoniad kevarguzet e ardarzh ha betek e revoud, bet stadet en ezbrezeliaded amerikan ha breizhveuriat *brezel ar Pleg Mor Persiat* (Eost 1990-Mezheven 1991), anezhañ gouvid, asikted, direizhoù a 'r c'hounerezh hag a 'r c'housed, darc'hoal ha laurioù strewek (arzostoù, poanioù kov, glizi, klopennadoù), azonoù dinodet 2 pe 3 miz goude kuitaat an aervaoù ha padet 6 miz da nebeutañ; ezreolder ebet na gaved dre an imboure'h klinikel pe amglinikel; gant aozerion 'zo e voe kirieget an ardizh ouzh aezhennoù pistrius (aezhenn sarin, iperit, h.a.) pe ar mezegadoù ergurañ (vaksinou, liaoù enepkahrismiñv evel ar vromidenn biridostigmin).

Golgi : appareil de ~ ◇ **Golgi's complex** or **apparatus** ◇ **benvegad g. Golgi** Organit kitoplasmel anezhañ *sac'hanou kibvanek* (an tornadur anezho oc'h ober an *diktiozom*), *pibanoù* ha *c'hweziganou*, sez enaozañ ar poliolozidoù hag ar glikoproteinoù.

gomme ◇ **gumma** ◇ **gom g. -où** Ent klasel, koeñvenn kantet o tinodiñ e diabarzh ar gwiadoù (he anvad diwar he c'hantalc'h pe diwar al liñvenn dev a ziver diouti), o tedeñ dre bevar lankad : kraider, gouliezañ, karzhañ, ratreañ; termen oc'h arouezñ da gentañ un darvoud eus ar sifiliz tredeel (*gom sifilitek*), astennet da gleñvedoù all (*gomou torzhellek, mikrozek*), arveret hiziv er Groc'henouriezh dreist holl da envel un ozvenn boreel loet er c'houidonenn, goulemm he dedroadur, o lezel war he lerc'h, goude karzhañ, un angreizh don.

gomphose ◇ **gomphosis** ◇ **gomfoz g., kenvell g. diloc'h** Seurtad kenvell stirek emañ an eil pezh anezhañ sanket en egile evel ma rafe ur c'henn, sk. : ar c'henvell logig-dant (Gl. *articulation alvéolo-dentaire*).

gonade ◇ **gonad** ◇ **gonad g.** Gwagrenn c'hanadel (klidenn pe vierrez), daou roll ganti : parañ ar gametoù ha borc'hañ hormonou o werediñ war ar bevedeg a-bezh (sl. *gamète*).

gonadocrinine ◇ **gonadocrinin** ◇ **gonadokrinin g.** Peptid paret gant ar vierrez o fraouaat hag o c'houluzañ borc'herezh ar gonadotropinoù (sl. *cybernine*).

gonadolibérine, lutéolibérine ◇ **gonadotropin-releasing hormone** or **factor, luteinizing hormone-releasing hormone** or **factor, LHRH** or **LHRF** ◇ **parenn b. elloñ ar gonadotropin, elloerenn b. ar gonadotropin** Polipeptid borc'het er gouzerc'hvel ha degaset dre ar founilh betek ar raggougorfenn ma reol borc'herezh ar gonadotropin.

gonadostimuline, gonadotrophine, hormone gonadotrope ◇ **gonadotropin** ◇ **gonadotropin g., gonadostimulin g.** Anvad rumm an hormonou o kentraouiñ arc'hwelerezh ar gonadoù gourevel ha benevel; o renkañ a reer e daou stroll : **1) gonadotropinoù gougorfennel** (Gl. *gonadostimulines hypophysaires*), daou seurtad anezho : *1a*) ar *g. g. A*, a zo e wered α) war ar venev, blivaat azvedigezh ar volc'henn vierrez ha delankañ borc'herezh an estron, β) war ar gourev, blivaat azvedigezh an ac'had speler; *1b*) ar *g. g. B*, a zo e wered α) war ar venev, delankañ dozviñ ar vigellig, treiñ ar bolc'hennou vierrez azv e korfoù melen hag, a-gedal gant ar prolaktin, kentraouiñ borc'herezh ar progesteron, β) war ar gourev, kentraouiñ borc'herezh an androgeieñer klidennel ha kaenuslounezhel; **2) gonadotropinoù korionel pe prolanou** (Gl. *gonadostimulines chorioniques* pe *prolans*), borc'het gant bodennoù an dorzhienn, bezant a-fonn e gwad hag e troazh an dougerezed, korvoet an dezventañ anezho evit deznaouiñ ar vrazzeded.

gonadotrope ◇ **gonadotrope** ◇ **1 gonadwezher** aa. **2 gonadwezher g. -ioù** 1 O werediñ war ar gwagrennoù ganadel. 2 Danvezenn c'honadwezher.

gonalgie ◇ **gonalgia** ◇ **glinost b.** Laur er glin.

gonarthrite ◇ **gonarthrit** ◇ **glinarzo g.** Tanijenn genvell er glin.

gonarthrose ◇ **gonarthrosis, osteoarthritis of the knee** ◇ **gonartroz g.** Remm henek anfoel ar glin (sl. *arthrose*).

goniomètre ◇ **goniometer** ◇ **kornventer g. -ioù** Ardivink da vuzuliañ ar c'hornioù mentoniell; arveret en Denoniezh da vuzuliañ kornioù an dremm hag ar c'hloppenn hag er Vevedouriezh da vuzuliañ ampled fiñvoù kenvelloù 'zo.

1 gonococcie **2 gonorrhée** ◇ **1 gonococcy, gonorrhœa** **2 gonorrhœa** ◇ **1 gonokokiezh b. 2 gonorreenn b.** 1 Poreadur gant ar gonokok, gwenerel (kantroazhfo, kantroazhgouzoufgo) pe angwenerel (kevresaefo linus an nevezc'haned). 2 Gonokokiezh gwenerel (sl. *blennorragie*).

gonocoque ◇ **gonococcus** ◇ **gonokok g. & s.** Spesad bakteri (*Neisseria gonorrhoeae*), gwexher spesadel ar vlennorragiezh.

gonosome ◇ **gonosome, sex chromosome** ◇ **gonozom g., kromozom g. revel** Pep hini eus an daou gromozom bezant er genrizh o arc'hvel desavelañ ar rev, kehed an daou gant ar venev hag arouezet XX, berroc'h unan eus an daou gant ar gourev hag arouezet XY (sl. *autosome, caryotype*).

gonosomique ◇ **gonosomal** ◇ **gonozomel** aa. A-zave d'ar gonozomou.

Goodpasture : syndrome de ~ ◇ **Goodpasture's syndrome** ◇ **azoniad Goodpasture** Anaez dibaot o tizhout ent hanbarek ar wazed yaouank, anezhañ kevreted ur *skeventad entremezel* naous dre skrouediadoù gwad arreat diwar ul logigfo gwadliñvus, amwad, hemosideroz, hag ur *bloueigfo* gant troazhproteinegezh, troazhwadegezh korrgreskerel ha skorted argammedek al lounezh, marvus dindan un nebeut mizioù en ur stad a wadusvec'h urea muiek; e 1975 e voe hennadet evel kleñved unhangaeel pa zinoad

dre hangaegendreluc'h unanantikforfoù antikennenn er gwadvez; gwellaet e voe an erbedad bennozh da arver ar c'hortikoidoù, ar plasmaedranñ hag an hemodializ.

Gopalan : **syndrome de ~**, **syndrome des pieds brûlants** ◇ **Gopalan's syndrome**, **burning feet syndrome** ◇ **azoniad Gopalan**, **azoniad an treid losk** Azoniad deskrivet en India, naous dre loskadurezh laurus an eizhaennoù, an treid dreist holl, an uc'heraez ha strafuilhoù gwazhiedloc'hadel; a-wechoù e noter tizhadoù lagadel (skotom, bouc'hwel); da arbenn e c'houlakaer an negez vitaminoù B ha proteinoù.

Gorlin : **formule des ~** ◇ **Gorlin's formula** ◇ **reollun Gorlin** Reollun oc'h araezañ jediñ gorread ar gwask kentez-kofig kleiz (mintrek), agevezh da ec'hongas ar galon ha d'ar gwask korrwazhiedel skevent; arveret e vez da geñver kevarguz prederiadur surjanel an isvoll mintrek; etre 4 ha 6 cm² emañ gorread gwask mintrek bonan an oadour.

gosier ◇ **fauces** ◇ **savn** b. Egorenn etre kavenn ar genoù hag ar c'hargadenn.

Gosselin : **signes de ~** ◇ **arouezioù Gosselin** 1 *Arouez o kevaraezañ diforc'hiñ ul lipom diouzh ur pugnez yen* : ur sac'had skorn pe un difruadur eter o yenaat ar yoc'henn a gallet al lipom ha ne gemm ket kantalc'h ar pugnez. 2 *Arouez ameeun torr al lestr* : pelladur helc'het ar vorzhed en tu klañv a zevoud ul laur lemm e par an torr 3 *Arouez an troad plat ez-kamm laurus* : pa hejer ar c'har ne volod ket an troad aet diloc'hek gant an dargrezañ 4 *Arouez kankr ar glidenn* : bezañs, dinodet dre an teuta, eus ul lavnenn dourvozhell dirak ar yoc'henn.

gossypol ◇ **gossypol** ◇ **gosipol** g. Livegenn velen fenolek bezant e greun ar c'hotoñs, o tarallañ ar sugañ hag ar c'hoaz-hañ pavezell, o tizhout ar frouezhusted c'hourevel, astalet he fistriegezh dre an tommañ.

gouge ◇ **gouge** ◇ **gouij** b. -où Kizell hantergranenn arveret e surjianerezh an eskern.

Gougerot-Houwer-Sjögren : **syndrome de ~**, **syndrome de Sjögren**, **syndrome arthro-oculo-salivaire**, **syndrome de l'œil sec**, **syndrome sec** ◇ **Gougerot-Houwer-Sjögren syndrome**, **Sjögren's disease**, **kerato-conjunctivitis sicca**, **buccoglossopharyngitis sicca**, **xerodermosteosis** ◇ **azoniad Gougerot-Houwer-Sjögren**, **azoniad Sjögren**, **azoniad ar glaourgennoù sec'h**, **azoniad sec'h** Azoniad o tarvezout dreist holl gant ar merc'hed goude 40 vloaz, anezhañ heskaat an daeroù, an halv ha borc'hadoù ar vriant, ar ganol vezhur, ar gouin, o tec'han sec'hded ha tanijenn ar glaourgennoù : kornaesefo, kevresaefo, frifo, gargadennfo, usteñv ha, goude, isteñv ar gwagrennoù halviñ; henek eo an dedro; renket e vez hiziv evel kleñved unanhangael.

gourme ◇ **1 milky scall** **2 strangles** ◇ **1 pellenn** b. **2 konkoez** g. 1 Anvad henvoazel dermatozioù an dremm hag ar brigenn (impetigo, ekzema poreet, trouskennoù soavred) o tizhout ar vugale. 2 Er Vilvezekniezh, poread ar c'hezeg diwar *Streptococcus equi*.

gourme des mineurs ◇ **ground itch**, **ankylostomiasis cutis** ◇ **ankilostomiaz** ar **c'hroc'hen** Kroc'henad naous dre an eritem hag an debron diwar an arvevedezh gant larv ankilostomed.

goutte ◇ **gout** ◇ **urloù** l., **eilliester urleier** Kleñved diwar strafuilh kennevid ar bazennoù purek o tevoudañ usvec'h an drenkenn urek er bevedeg, erzerc'h dre varroù foel lemm ha laurus en arzoù, er c'henvell kreiztroad-oeñsoù kentañ pegen ha dre goc'hionadoù urat lec'hiet er furmadurioù tro-genvell, el lounezh, e pleg ar skouarn; goude bloavezhioù ez ervez d'an urloù henekaat, gant koc'hionadoù trenkenn urek pe urat dindan ar c'hroc'hen (*tofuzoù*), e-barzh ar c'henvelloù (*arzadoù urlaouel*), ar stirennoù hag er flugez : an nerveg (*nervastou*), al lounezh (*grouanegezh urek*, *lounezhfo entremezel*), ar rezhiaed kalongwazhiedel (*kurunerfo*); ekichen an *urloù kentael*, genezhel, hêrezhel, e teskriver *urleier eilvedel* dianlen da wadnaouedoù, d'ar skorted lounezh, da gemeratur liaoù 'zo; azoniek e van prederiadurioù an urloù kentael : ouzh ar barroù lemm ez eo efedus ar *c'holkikin*, evel mezegadur hirbad e tiounezer heuderoù enaozerezh an drenkenn urek (*allopurinol*).

gouttière ◇ **cradle-like splint** ◇ **savnell** b. Steudell disloc'h bet moulet ouzh ur parzh korf (kef, ezel) evit e gavellañ hag e zerc'hel fest (sl. *appareil de contention, orthèse*).

grabataire ◇ **bedridden**, **bedfast** ◇ **treffledat** aa. A-zivout ur c'hlañvour a vir outañ e stad a vont diwar e wele.

gradient ventriculaire ◇ **ventricular gradient** ◇ **diri** g. **kofigél** Er c'halonvarrwezañ, ahel keitat (GË pe ÂQRST) ar gemplezh kofigél hollel, sammad sturiadel an daou ahel keitat QRS ha T.

Graefe : **maladie de von ~**, **amaurose avec excavation** ◇ **Graefe's disease** ◇ **kleñved von Graefe** Anaev heñvel e azonou ouzh re ar glaokom (pukadur ar vegenn, strishadur ar gwelvaez) lakaet er-maez an uswask enboullel.

Graefe : **signe de von ~** ◇ **Graefe's lid reaction**, **Graefe's sign** ◇ **arouez** b. **von Graefe**, **erwez** g. **von Graefe** Gorren-gouzizañ ar valvenn grec'h ankedalek diouzh loc'hadoù ar voull lagad, anadenn a stader gant ar pennsac'h bourbellus (sl. *Baselow* : *maladie de* —).

1 graisse, **corps gras**, **matière grasse** **2 graisse**, **tissu adipeux** ◇ **1 grease**, **fat** **2 fat (tissue)**, **adipose(tissue)** ◇ **1 druzenn** b. **2 behin** g. 1 Danvezenn eouliek a orin meinel, struzhel pe loenel. 2 Danvezenn lodek er bevedeg enaozet gant an adipokit, naous, a) ent fizikel, dre he andilezhded en dour hag he hezilezhded en eter, er c'hloroform, er benzen, b) ent kimiek, dre luniad he molekul, o tisoc'h eus molekul glikerid esteraet dre unan, div pe deir bevdrenkenn (sl. *adipocytes*, *cholestérol*, *glycérides*, *lipide*).

-gramme

• *adénogramme* gwerblennrestrad, adeno-gramm • *angiogramme* gwazhiedlunad • *anti-biogramme* bevastalbrouad • *apexocardio-gramme*, *apexogramme* kalongerndresenn, kerndresenn • *artériogramme* talmerennlunad • *atriogramme* kentezvarwezad, ken-

tezwevad • *audiogramme* klevdresenn • *ballistocardiogramme* kalondevannwevad, ballistokardio-gramm • *balistogramme* devannwevad, ballisto-gramm • *bas voltage à l'électrocardiogramme* kalonisvarrwevad • *bronchogramme* bronkez-lunad • *bronchogramme aérien* bronkezaer-lunad • *carotidogramme* karotidresenn • *cho-lémogramme* gwadvec'hieg vestlel • *colpocyto-gramme*, *colpogramme* gouinrestrad, kolpogramm • *cystométrogramme* c'hwezhi-gell-ventwevad • *dactylogramme* louc'hadbizied, biz-louc'had, louc'hwezad ar bizied, bizlouc'hwezad • *dermogramme* kroc'henrestrad, dermogramm • *dextrocardiogramme* dehougalonwevad • *échapper au programme* ec'houl-leviañ • *échogramme* stenerlun • *électrocardio-gramme* kalonvarrwevad • *électroophthalmo-gramme*, *électro-oculogramme* lagadwevad • *électrocardio-vectogramme* kalonsturiadwevad • *électrocochléogramme* mel-c'houedenn-varrwevad • *électroencéphalo-gramme* empennvarrwezañ • *électrogramme* tredanwevad • *électromyogramme* kahe-*varrwevad* • *electronystagogramme* nistag-muzvarrwevad • *électrophorégramme* tredannizhwevad • *électroprotéino-gramme* tredanbroteinrestrad • *équivalent-gramme* tolz mol kevatal • *fécalogramme* oulennrestrad • *ionogramme* ionrestrad • *programme* goulev • *scinti-gramme* skinlun • *spirogramme* gwentwevad • *vectogramme spatial* sturiadwevad teirment.

granule ◇ **granule** ◇ **greunan** g. 1 Elfenn deskivadurel er Gelligouriezh, sk. : *greunanoù livlen stalet alinenn a-hed ar c'hromatidoù* (sl. *chromomère*). 2 Furm c'halenek, pilulenn a vent vihan.

granulé ◇ **granule** ◇ **greunigoù** l. Furm c'halenek e rezh bruzun, enno ur c'henfeur sukr uhel peurliesañ.

granulie, **tuberculose miliaire** ou **micronodulaire** ◇ **acute military tuberculosis** ◇ **milierenn** b., **torzhellegezh** b. **vilier** pe **nozelenek** Furm lemm hag hollek eus an dorzhellegezh, naouus, ent neuziadurel, dre ur strewad greunennadoù louet, ar *bolc'hennoù torzhellek* pe *torzhelloù milier* (Gl. *follicules tuberculeux* pe *tubercules miliaires*), er skevent hag en holl organoù pe dost, ar bazhilli o vezañ aloubet ar bevedeg dre hent ar gwad; ent klinikel, en he furm lemm, terzhiennek hag angwentek, e tedro herrek ar vilierenn d'ar marv; deskrivañ a reer furmoù goulemm ha henek (*milierennoù yen*, Gl. *granulies froides*) dinoet dre ar skinluniñ hepken.

granulocytaire : **lignée** ou **série** ~, **lignée granulose**, **lignée** ou **série myélocytaire** ◇ **granulocytic series**, **myeloid series** ◇ **ac'had** g. pe **steudad** b. **granulokitek** Heuliad ar c'helligoù yaouank o neriiñ hag oc'h azviñ er mel eskern betek disoc'h gant ar granulokit; adalek ar vongellig, d'ober ar steudad, ez a lerc'h ouzh lerc'h : an hemokitoblast, ar mieloblast, ar promielokit, ar mielokit, ar metamielokit hag ar granulokit.

granulocytes, **polynucléaires** ◇ **granulocytes**, **polynuclear** ◇ **granulokit** s., **leukokit** s. **greunek**, **polinuklear** s. Seurtad leukokit, etre 12 ha 14 µm treuzkiz, dezho ur protoplasm greunek hag ur graoñell grouizek, ken hoskadek ma hañval revout lies kraoñell (alese an anvad kentañ, ankevasas evitañ da vezañ en arver bepred, *polinuklear*, Gl. *polynucléaires*); hervez o lenidigezh ouzh al livuzennoù e tiforc'her ar *granulokit neutrofil*, *eozinofil* ha *bazofil*.

granulocytopenie, **granulopénie** ◇ **granulocytopenia** ◇ **olgranulokit** g. Isniver leukokit greunek er gwad; un anaez marvus hogos bepred eo an olgranulokit yud e rezh un olneutrofil eizhañ, pe *agranulokitose* (sl. *agranuloctose*).

granulocytopeniëse, **granulopeniëse** ◇ **granulocytopeniëse** ◇ **granulokitparañ** Furmiñ al leukokit greunek.

granulogramme ◇ **granulogram** ◇ **greunrestrad** g. Disoc'h studi ar greunennoù er granulokit.

granulomatose ◇ **granulomatosis** ◇ **granulomatoz** g. Anaez naouus dre vezañs lies granulom er bevedeg.

granulomatose lipoidique ◇ **lipoid granulomatosis** ◇ **granulomatoz** g. **lipoidel** Kleñved grevus o tizhout ar vugale hag ar grennarded, naouus dre ziwandur nozeleñnoù granulomatus niverus amparet gant kelligoù retikuloendotelel ensilet a eil lankad gant lipid, war an eskern (eskern ar c'hloppenn pergen), ar c'hroc'hen, ar gwerblennoù, an avu, ar felc'h hag ar flugez all, kevret gant terzhien; berr alies ha marvus eo an dedroadur (sl. *Schüller-Christian* : *maladie de* —).

granulomatose septique progressive, **chronique** ou **familiale** ◇ **progressive septic granulomatosis**, **chronic granulomatous disease** ◇ **granulomatoz lestel argammedek**, **granulomatoz henek familhel** Anaez hêrezhel enkilek, revereet, o tizhout ar baotred, naouus, ken abred ha kentañ bloavezh ar vuhez, dre boreadoù ha linadurioù er gwerblennoù, ar c'hroc'hen hag ar flugez (ar skevent pergen), niverus, adfeilhus ha marvus war verr pe verroc'h termen; dre ar vezañs en holl organoù eus granulomatoù foel; dre un elwenn gant usniver ar granulokit neutrofil — ar re-mañ a fagokit ar garvevion nemet e vezont divarrek d'o dispenn; dre wadusvec'h ar gammaglobulinou, gant reolded an immunoglobulinou, an antikorfou amredat hag an erwezhiou dreistkizidigezh daleet; kiriek eo divigad un enzim (an *NADPH oksidaz*) o tec'han steuz ar fagokitañ.

granulome, **plasmome** ◇ **granuloma** ◇ **granulom** g. Yoc'henn foel, o c'hoarvezout a wiad kenglenel gwazhiedek kenan hag ensilet ennañ kelligoù liesneuz histiokit, leukokit, plasmokit, h.a.; spesadel e c'hell bezañ ar granulomou, d'an dorzhellegezh, d'al lovrezh, d'ar sifiliz, d'ar favuz, h.a.

granulome annulaire ◇ **granuloma annulare** ◇ **granulom gwalennek** Dermatiz kuñv naouus dre dosennoù roz, dilaur, bodet a-walennoù; sellet gwechall evel un tuberkulid, hiziv kentoc'h evel un erwezh allergiek.

granulome apical ou **dentaire** ◇ **dental** or **apical granuloma** ◇ **granulom dentel** pe **kernel** Granulom diwanet e beg gwrizienn un dant a zo marvennet e vouedenn.

granulome des piscines ◇ **swimming-pool granuloma** ◇ **granulom al lennoù neuñviñ** Granulom a'r c'hroc'hen, gwenannvanek, henek, sezet en daoulin dreist holl, kiriek dezhañ *Mycobacterium marinum*, entoet dre ar graspadou graet ouzh speurioù al lennoù neuñviñ.

granulome glutéal infantile ◇ **granuloma gluteale infantum** ◇ **granulom peñsel ar vabaned** Dermatiz a'r magadelled naouus dre ar vezañs war ar feskennoù ha parzh krec'h diabarzh eus niverzhed eus nozeleñnoù kemparzhiek a vent d'ur gerezenn,

gant hiperkeratoz ha hiperakantoz an epiderm hag ensiladur an derm gant plasmokit ha granulokit, o tedeñ emdarzhel d'ar pare dindan un nebeut mizioù; kevarguzet e van an arbenn : kandidoz evit aozerion 'zo, erwezha ouzh un haluzenn pe ur c'hortikoid diounezet ouzh ur c'hroc'henfo (alese an anvad rumm *halogenidoù struzhennek ar vabaned*, Gl. *halogénides végétantes infantiles*).

granulome malin centro-facial ◇ **malignant granuloma of the face** ◇ **granulom yud kreiz-dremm** Anaez deraouet evel ur frinaouez hag o tevoudañ marvenn angreizhek eskern ha migern ar fri, ar c'hevioù, ar stavn hag ar poull lagad, o tedeñ dindan un nebeut mizioù d'ar marv dre gwadliñvoù ha poreadur; dianav eo e arbenn; ent wiadoniell e noter anafoù ur granulomatoz nebant.

granulome ulcèreux des parties génitales, granulome inguinal, granulome vénérien ◇ **granuloma inguinale, granuloma venereum, pudendal ulcer** ◇ **granulom ar varlenn, granulom angreizhek an tachadoù ganadel, granulom gwenerel** Kleñved gwenerel ar broioù tomm diwar *Klebsiella granulomatis*, naouus dre nozeleñnoù tuet da angreizhañ, sezet dreist holl war an organoù genel (mezenn, kourzh), henek hag en ervez da zec'han kolloù korfadurel bras e rannbarzh ar varlenn hag ar marv dre wadlestegzh pe wadliñvañ.

granulopexique ◇ **granulopectic** ◇ **strodlenus aa.** A-zivout arc'hwel un organ (avu) pe kelligoù (reizhiad retikuloendotelel) o tezerc'hel en o elfennoù ar rannigoù sonnel amredat.

granulosa, épithélium folliculaire, TA stratum granulosum ◇ **granular layer of the follicle of the ovary** ◇ **haen b. c'hreunek** Gwelead kelligoù greunek o c'hronnañ ar vi ha kavenn liñvennel bolc'henn ar vierrez.

granulosité ◇ **granulosity** ◇ **1 greunegezh b. 2 greunegen b.** 1 Natur pe neuz greunek. 2 Elfenn pe gorreenn ampart gant greun.

(-)**gran-, gren-**

- *cellules granulaires et agranulaires* kelligoù greunigaouek hag angreunigaouek
- *chacun des granules disposés de façon linéaire le long des chromatides* pep hini eus ar greunanoù stalet a-linenn a-hed ar c'hromatidoù
- *couche granuleuse, stratum granulosum* haen c'hreunek
- *cylindres constitués par des éléments figurés (cellules épithéliales, hématies, leucocytes, granules)* rolledoù ampart gant elfennoù luniek (kelligoù epitelel, hemati, leukokit, greunigoù)
- *dégranulation* dic'hreunennañ, dic'hreunennadur
- *formation exubérante, granuleuse, rouge* furmadur paoterus, greunek, ruz
- *desquamation de pneumocytes granuleux* gourc'hennañ pneumokit greunek
- *granulations basophiles* greunennadoù bazennlen
- *granulations d'une plaie* tiñvennoù ur gouli
- *grosses granulations faciles à colorer avec l'éosine* greunennadoù tev lenidik ouzh an eosin
- *la présence dans le foie de granulations d'un jaune roux* ar vezañs en avu eus greunennadoù arvelen
- *protoplasme granuleux* protoplasm greunek
- *mélange utilisé sous forme de poudre ou de granules* meskad danvezet e stumm poultr pe greunigoù
- *substance d'aspect variable (pâteux, finement grenu ou gélatineux)* danvezenn lies neuz dezhi (toazek, greunigaouek pe kaotek)
- *un tissu de granulations comme la lumière bronchiolaire* aloubet eo forzhioù ar c'horrvronkez gant ur gwriad greunenek.

graphitose ◇ **graphitosis** ◇ **grafitoz g.** Skeventad micherel, analeuflegzh diwar dewentañ pell amzer uloc'h grafit.

graphomanie, scribomanie ◇ **graphomania** ◇ **skrivvar g.** Darlusk andistrec'h, ambreek pe mac'hennek, da skrivañ.

graphophobie ◇ **graphophobia** ◇ **skrivarur g.** Amgren neurozek da skrivañ.

graphorrhée ◇ **graphorrhoea** ◇ **froudskrivañ** Ezhomm andistrec'h da skrivañ, arvez eus ar vroudoni hag an trefiñv, stadet e lies bredanaez (psikozioù, envedi, h.a.).

grasping reflex, réflexe de préhension ◇ **grasping reflex** ◇ **erwezha g. gavaelgar** Serridigezh diarzoug an dorn pa vez spinet ar palv, a stader en nevezc'haned (damoug a-henhil) ha gant an azoniad talel (sl. *évitement : réaction d'~*).

gravelle ◇ **gravel** ◇ **gravell g.** (Termenoù dispredet) 1 Fetisaennoù lounezhel a vent gant ur penn spilhenn; *traezh troazhel* (Gl. *sable urinaire*) a reer eus ar fetisaennoù bihanoc'h, *grouan* (sl. *calcul*) eus ar re vrasoc'h. 2 Dre astenn ster, kenster da *grouanegezh troazhel* (sl. *lithiase urinaire*).

gravidisme ◇ **gravidism** ◇ **bec'hiegezh b.** Stad vevedourel ar vaouez vrazez (sl. *gros-sesse*).

(-)**grav-**

- *accidents gravidiques* darvoudoù ar vec'hiegi, darvoudoù bec'hiegiel, darvoudoù bec'hiegezhel
- *aggravation, (s')aggraver* grevusaat
- *agravité* anponnerder
- *dou-leur gravative* laur ponnerek
- *atteinte grave* fallded
- *éclampsie gravidique* eklampsiezh
- *état morbide post-gravidique* stad kleñvedel goude bec'hiegi
- *gravidité* bec'hiegi, brazded
- *gravité* grevusted
- *inciser l'utérus gravide* flañchañ ar grozh vec'hiek.

gray ◇ **gray** ◇ **gray g.** Unanenn doead skinad ionaus luget (arouez : Gy) : par eo ar gray da ur joul dre gilogramm (sl. *dose absorbée*).

greffe ◇ **graft** ◇ **imboud g., imboudañ** Ensezañ war un hinienn ul lodenn wiad pe organ gorreet diwarni he unan pe diwar un hinienn all; tennañ a ra da steuziañ ar c'hemm a lakaet etre *imboudañ* ha *treuzplantañ*, eleze ensezañ un organ a-bezh erlamet diouzh un den all (sl. *allogreffe, autogreffe, hétéogreffe, isogreffe, transplantation*).

greffon ◇ **graft** ◇ **imboudenn b.** Lodenn a 'r gwriad pe a 'n organ erlamet hag ensezet da geñver an imboudañ.

greffon vasculaire ◇ **vascular graft** ◇ **imboudenn wazhiedel** Dafar arveret evit amsaviñ ar gwazhied, an talmerennoù peur-liesañ, ar gwazhiennoù a-wechoù : erlamet e c'hell bezañ diwar an hinienn he unan (*imboudenn unanien*, Gl. *greffon autologue*), diwar un hinienn all bev pe marv (*imboudenn unspesadien*, Gl. *greffon homologue*), diwar ul loen (*imboudenn allspesadien*,

bevosod, Gl. *hétérogreffe, bioprothèse*); amparet e c'hell bezañ ivez an imboudenn gant un danvezenn gevanaoz (*imboudenn gevanaoz, anvevosod*, Gl. *greffon plastique*).

Gregg : syndrome de ~ ◇ **Gregg's syndrome** ◇ **azoniad Gregg** Teskad ar c'hamneuziadoù stadet a-wechoù ken abred hag ar c'hanedigezh war ur bugel a zo bet tizhet e vamm gant ur ruzig a gentporead (furm hennadus dre vezañs an immunoglobulinou M er gwadveiz) e-kerz tri mizvezh kentañ he brazded : ferennlug kreiz, daoudou hogos bepred hag o tevoudañ an dallentez, kevret a-wechoù gant ur gorragadegezh hag ur gaouluc'hsaefo livegat, bouzarded, anafoù kalon (dreistpad ar san dalmerel, kehentad etre-kofigoù pe etre-kentezoi, ezreolderioù dentel, strafuilhoù bred); rihzhellnaoued o lezel ur berrhoali gant ar vabaned.

grenouillette, ranule ◇ **ranula** ◇ **roegell b.** Yoc'henn halvel enketet e talbenn traoñ an teod hag en tric'hogn endan-c'haved (heñvel mouezh ar c'houzviaded ouzh roegad ar raned); ar *roegell lemm* (Gl. *grenouillette aiguë*) a reer eus koeñvadur trumm laurus ur wagrenn halviñ steviet he c'hanol degorzhañ gant ur c'hrouanenn.

Griesinger : signe de ~ ◇ **Griesinger's sign** ◇ **arouez b. Griesinger** 1 Mabusvoll e tu an anaf pa vez ur fennad enklompennel. 2 En tifoid, steuz trommed an avu pa war un toraezhad diwar dreloezadur ar pevez.

griffe cubitale ◇ **ulnar hand** ◇ **kraban b. a-helmo** Lakadur an dorn pa vez seizet an nervedenn a-helmo : gourastenn an oefs nezek ha plegadur an daou oefs diwezhañ eus ar biz gwalenn hag ar biz bihan.

griffes ou griffures de chat : maladie des ~, lymphoréticulose bénigne d'inoculation ◇ **cat scratch fever or disease** ◇ **kleñved a'r skilfadou kizhier, limforetikuloz g. kuñv enkoradel** Anaer naous dre ur c'hwarrenn c'houlemm, anlaur ha diderzhienn, o tizhout un pe lies gwerblenn eus ur stroll bas, o trediñ peurvuiañ war-du al linañ, ha dre un elwenn leiek, o parañ a-endarzh a-benn un nebeut sizhunvezhoù; devoudet eo gant ur vazhell vihan Gram — oc'h enteñ dre ur gliadienn groc'hen pe glaourgenn, ur skilfadenn gazh alies; kevarguzet eo natur an hadenn : *Afpia felis* pe *Rochalimaea henselae*.

griffon ◇ **origin of a mineral spring** ◇ **havdarzh g.** Strinklec'h un eienenn dour melar.

grippe, influenza ◇ **influenza, flu, grippe** ◇ **grip g., influenza g.** Pore darreuziat, tredizhus, diwar ur viruz gant RNA eus ar c'herentiad *Myxo-virus influenzae*, o revout e rezh lies rizh : A (ar paotañ stadet), B ha C, gant lies isrizh : H₁N₁, grip spagnat; H₂N₂, grip aziat; H₃N₂, grip Hong-Kong, H₅N₁, h.a. (H evit hemaglutinin, N evit neuramidaz, daou c'hikloprotein eus golo ar viruz); naous ent klinikel dre un deroù trumm, terzhienn da 40°C, kaheostoù, klopennadoù brevus, grevadurezh hollek hag azonoù diseurt : maeloù ha darwazh skevent, nervostou, strafuilhoù koazhadel (skritellet *grip pervezel*, e gaou, rak ar viruz ne dizh ket ar bouzelloù), dre un dedro d'ar pare a-benn un nebeut devezhoù; a-wechoù, goude diwresteriñ e tistro an derzhienn (V gripel); furmoù grevus a zeskriver, e dalc'h anialegezh an hadenn pe ar c'hevrediñ anezhi gant bakteri (*Haemophilus influenzae* pergen), kiriek da rouestladioù bronkezskventel; darreuziadoù istorel eo ar *grip spagnat* (1918, a 20 da 40 milion a dud var, diwar ur viruz nes da hini *grip ar moc'h*, H₁N₁), ar *grip aziat* (1957), *grip Hong-Kong* (1968, viruz A) (sl. *encéphalite virale, grippe aviaire, hog-flu, vaccination antigrippale*).

grippe aviaire ◇ **avian influenza, fowl plague** ◇ **grip an evned** Kleñved tredizhus kenan, marvus alies, devoudet gant un *Influenzavirus* o tizhout an evned gouez hag an evned magañ; deuet treuzkasadus d'an den ez eo kiriek da zarreuziadoù bet stadet abaoe 1997 er Reterazia (Sina, Viêtname) hag en Izelvrioù (viruz H₅N₁); erzerc'hañ a ra en den e rezh terzhienn, kaheostoù, kevresaefo.

grip-

• *faciès grippé, faciès péritonéal* enebrezh ampelennek • *grippe d'été, myalgie épidémique* kaherost darreuziadek • *grippe saisonnière* grip rannvloazel.

gris : syndrome ~ ◇ **grey syndrome** ◇ **azoniad louet** Arne azlouet korf an nevezc'haned, kevret gant dulaz ha koempad, diwar ur pistradur gant ar c'hloramfenikol; gougelat e vez an erdeb.

Grisel : maladie de ~ ◇ **Grisel's disease** ◇ **kleñved Grisel** Penngamm eilvedel d'ur poread a'r fric'hargadenn pe a'n tachad drek-gargadenn, en ervez da zec'han rouestladioù el livenn c'houzoug : angrizad stirek ar c'higennoù hag ar stagelloù ha darvoudoù en hirvel hag er mel dre amwaskañ.

grossesse, gravidité, gestation, formation du fœtus ◇ **pregnancy, gestation, gravidity, fetation** ◇ **1 brazded b., bec'hiegi b., krouellañ 2 bec'hiegezh b.** 1 Stad ar vaouez dougerez. 2 Padvezh ar vec'hiegi, etre ar frouezhigini hag ar gwilioud pe ar sioc'haniñ, eleze an amzer ma tiorre dedaolad an engehentañ e-barzh organoù genel ar venev.

grossesse ectopique ou extra-utérine ◇ **extrauterine pregnancy** ◇ **bec'hiegi ezlec'hiat, bec'hiegi ezkrozhat** Emdreñ ar vi e-maez kavenn ar grozh, eleze pe e-barzh korzenn ar grozh (*b. gorzennat*, Gl. *g. tubaire*), pe er vierez (*b. vierezat*, Gl. *g. ovarienne*), pe e kavenn an ampeleñ (*b. gofat*, Gl. *g. abdominale*).

grossesse molaire ◇ **molar pregnancy** ◇ **bec'hiegi volel** Bec'hiegi o trediñ war-du dic'henezhadur kistel bodennoù ar c'horion (mol hidatiform).

grossesse prolongée ◇ **post maturity** ◇ **bec'hiegezh askouezhet** Bec'hiegi o padout e tu-hont da 42 sizhunvezh goude deiziad ar mizioù diwezhañ, dale en ervez da zec'han marv ar grouell.

grossesse : diagnostic biologique de la ~ ◇ **biological diagnosis of pregnancy, pregnancy test** ◇ **prouad ar vec'hiegi, deznaou bevoniel ar vec'hiegi** Prouad diazezet war arglask an hormon korionel gonadotrofik (hCG) — gourfaoterek e-doug ar vrazded — e-barzh troazh pe gwad ar vaouez da imbours'hiñ; dilezet eo hiziv an araезд a oa dinioñ gwered an ensinklañ

troazh pe gwadveiz war stirad ganadel loened imbourc'hva; hiziv ez arverer hentennoù herrekoc'h ha resisoc'h (hangaoniell, skinhangaoniell, hangaenzimatek, hangaegndreluc'hel).

grossesse à risque élevé ◇ **high risk pregnancy** ◇ **bec'hiegi uhelriskl** Bec'hiegi en ardeb bras da rouestlañ pe da zifourkañ war c'hanedigezh ur bugel ezreol; an dro eo p'he deus ur vaouez ganet endeo ur bugel gantañ ur c'hleñved hêrezhel pe ur gou-skoevad kromozomel; p'he deus bet krozhwadliñvoù e deou he brazezed; p'he deus gouzañvet ur skinata, ur c'heuziad viruzel pe liael; pa 'z eo uswaskek pe oadet a ouzhpenn 40 vloaz.

gros(-)

• *gros intestin* bouzellenn dev • *gros ventricule gauche* usvent ar c'hofig kleiz • *grossesse nerveuse, fausse grossesse, grossesse imaginaire* asvan brazezed, brazezed asvanek, gaouvrazezed, asvan bec'hiegi, bec'hiegi asvanek, gaou-vec'hiegi • *interruption volontaire de grossesse* divec'hiegiñ devredet, sioc'haniñ gwezhiet • *le masque de la grossesse* gweenn ar vrazezded • *le troisième mois de la grossesse* trede miz ar vrazezvezh, trede miz ar vec'hiegevezh • *les gros vaisseaux de la base du cœur* ar gwazhiel bras eus diaz ar galon.

groupage ◇ **typing** ◇ **risa** Desavelañ rizh ur gwad (*gwadrisa*, Gl. *groupage sanguin*, Sz. *blood typing*), al leukokit (*risa leukokit*, *gwennrisa*, Gl. *groupage leucocytaire*, Sz. *leucocyte grouping*), ur gwiad (*gwiadrisa*, Gl. *groupage tissulaire*, Sz. *tissue typing*) — gwennrisa ha gwiadrisa o vezañ renet da sevel ur reizhiad rummañ (sl. **système HL-A**).

groupes sanguins ◇ **blood types** ◇ **rizhoù s. (g.) gwad** Rummoù ma renker an hiniannoù hervez ar seurtad *aglutinogenoù* (antigenoù eritrokitel) hag *aglutininoù* (antikorfou gwadveiz : hemoaglutininoù) piaouet gant o ruzkelligoù hag o gwadveizoù, diziouerus o anaout evit an treuzskuilherezh gwad hag an imbouderezh organoù; lies reizhiad rummañ a arverer : ar *reizhiad ABO*, savelet gant Landsteiner e 1900, o tiforc'hiñ ar pevar rizh A, B, AB hag O, ar bouezusañ evit an treuzskuilhañ; ar *reizhiad MNS*, talvoudus evit an Denoniezh; ar *reizhiad Rhesus* (Sz. *Rhesus blood type*), h.a.; fest ha digemm eo rizh gwad pep hinienn.

groupes tissulaires, groupes leucocytaires ◇ **leucocyte grouping, tissue typing** ◇ **rizhoù gwengwiadel** Rummoù ma renker an hiniannoù hervez ar seurtadoù antigenoù gwiadel ha gwennpladanel a biaoouent, an kez antigenoù o vezañ gougevret evit an darn vuiañ ouzh reizhiad pennañ ar rizh, ar reizhiad HL-A; diziouerus eo anaout ar rizhoù gwengwiadel evit gwezhierzh an imboudoù gwad hag an treuzplantadurioù organ.

group-

• *donneur isogroupe* roer unrizh • *ensemble de groupements chimiques responsables des bandes d'absorption* hollad ar strollou kimiek e devoud bezañs ar bannoù lugañ • *groupe d'individus ou de cellules issus par reproduction asexuée d'un seul individu ou d'une seule cellule* teskad hiniannoù pe kelligoù evodet dre ouennañ anrevet diouzh an un hinienn pe diouzh an un kellig • *groupe de cellules génétiquement identiques* stroll kelligoù hilunglad • *groupe de composés neuro-leptiques* stroll kediadoù neuroleptek • *groupement carboxylique* stroll karboksilek • *groupement fonctionnel* stroll soazel • *protéine colorée dont le groupement prosthétic* contient un élément métallique protein livek a zo un elfenn vetalek en e stroll prostetek.

guanidine ◇ **guanidine** ◇ **guanidin g.** Bazenn greñv pistriek kenan, parzhiat er c'haher deveradoù 'zo anezhi.

guanidinémie ◇ **gwanidinaemia** ◇ **gwadvec'h guanidin g., guanidinwadvec'h** Feur gwad ar guanidin, reol etre 7 hag 20 mg/l; gwadusvec'h guanidin a stader en uswask talmerel, er skorted lounezh hag en eklampsiezh.

guérison ◇ **recovery, cure, healing (ur gouli)** ◇ **pareañ, pare g.** Distro d'ur stad yec'hed kevatal d'an hini a oa a-raok ar c'hleñved pe ar gloazad; ent lezennvezegel e tiforc'her pare ha stabiliadur (sl. **consolidation**): testeniañ ar pare zo kement hag ezlakaat nep divarregezh.

NOTENN : Heñvelsterioù niverus gant arlivioù diseurt a arverer ivez : *yac'haat, gwellaat, dont e-barzh, frankaat, bagoliañ, bezañ sampar en-dro; pareañ, pareidigezh, pareadur, gwellaenn, bagoliadur*, h.a.

Gunn : signe pupillaire de Marcus ~ ◇ **Gunn's pupillary phenomenon** ◇ **arouez b. vabel Gunn** Miervezh ar mab lagad ouzh ar gouloù : mabisvoll dibad heuliet gant ur mabusvoll ezreol, arouez an nervennfo gweledel.

gustométrie ◇ **gustometry** ◇ **blazandalañ** Imbourc'hiñ an tañva, kreñvder eraezñ ar blazioù pergen.

Guyon : épreuve des trois verres de ~ ◇ **three glass test** ◇ **prouad g. an teir gwerenn** Hentenn arveret da zinoñ poent loc'hañ ur gwadtroazhañ; goulenn a reer digant ar gouzviad troazhañ e-barzh teir gwerenn : 1) mar bez unliv an teir gwerennad, e teu ar gwad eus al lounezh, 2) mar bez livekoc'h an teirvet, e teu eus ar c'hwezhiell, 3) mar bez ruz ar gentañ gwerennad dreist holl, e trezeer ez eo parzh adreñv ar c'han troazh a zo o wadañ.

gymnastique ◇ **gymnastics** ◇ **korfembregerezh g., gimnastik g.** Pleustr an embregoù o amkan gwevnaat ar c'horf ha kreñvaat ar c'higennoù; ar *gimnastik mezege* zo ur rann eus al Leuñvouriezh, anezhi engwezhiñ hag evezhiñ embregoù addiorren hag azgouestaat nerval-kaherel, dereizhañ pe kevassav.

gymnique ◇ **gymnic** ◇ **1 korfembregel aa., gimnikel aa. 2 korfembregouriezh b., gimnik g.** 1 A-zave d'an embregoù korf. 2 Skiant an embregoù korf.

gynandrie, gynanthropie ◇ **gynandrism** ◇ **ginandriezh b.** Gaouerevegezh damel gant ar vaouez naouus dre ar vezañs eus eilarouezioù revel gourevel, dre usteñv an ellig ha dlidat ar muzelloù bras, nemet e van benevel ar gwagrennoù revel hag ar genrizh (sl. *hermaphroditisme, génitosurrénal : syndrome* ~).

gynatrésie ◇ **gynatresia** ◇ **anvoll ar forzhioù** Andigor kanol c'hanadel ar plac'h (gouin, gouzoug ar grozh) (sl. *atrésie du vagin*).

gynécologie ◇ **gynaecology** ◇ **benevouriezh** Arbennigiezh vezegel o plediñ gant an anaezioù benevel.

gynécomastie ◇ **gynaecomastia** ◇ **benevvronegezh** b. Usteñv an divvronn gant ar paotr.

gynogenèse ◇ **gynogenesis** ◇ **ginogenez** g. Diorreadur ur rizhell diwar ur vigellig reol frouezhiget gant ur spergellig bet ezvevennet he c'hromozomoù (sl. *androgenèse* 3).

gynoïde ◇ **gynoid** ◇ **benevvanek** aa. A-zivout ur paotr gant doareoù neuziadurel ur plac'h (sl. *androïde*).

gynomérogonie ◇ **gynomerogony** ◇ **ginomerogoniezh** b. Diorreadur ur vi frouezhiget, ennañ ar pronukletüz benevel hepken, ar pronukletüz gourevel o vezañ bet digraket goude m'he deus ar spergellig fraouaet ar vigellig (sl. *androgenèse* 3, *andromérogonie*, *gynogenèse*).

H

H : *onde* ~ ◇ **H deflexion** ◇ **gougammañ H** Gougammañ ar c'halonvarrwevad a-geñver gant gweredezh an hordenn gentez-kofig; lerc'hwezet e vez dre un elektrod enkavennel dodet e-barzh ar galon dehou e diastok an dilhenn, e rez ar speur gentez-kofig, ouzh lodenn grec'h an trapig tribroudek.

Haab : **dégénérescence maculaire de** ~ ◇ **Haab's macular degeneration** ◇ **dic'henezhadur g. brizhennel Haab** Anaf dic'henezhadel brizhenn al luc'hsae a stader gant ar c'hozhiad, alies daouduiek hag o tec'han koll ar gweled kreiz.

Haab : **réflexe de** ~, **réflexe pupillaire corticovisuel** ◇ **Habb's reflex** ◇ **damoug g. Haab, damoug pluskenngwel-edel** Mabisvoll o tarvezout pa vez tennet an evezh ouzh ur vammenn luc'h gwan ha lec'hiet pell pe pa ambreder derc'had al luc'h.

Haab-Dimmer : **dystrophie cornéenne de** ~ ◇ **Haab-Dimmer degeneration, lattice dystrophy of the cornea** ◇ **mideñv g. ar gornsae Haab-Dimmer, mideñv treilhek ar gornsae** Mideñv hêrezhel ar gornsae, treuzkaset er mod trec'hek aotozomek, naouus dre ur rouedad edañvennou gouskogos treilhek loet e parzh kreiz ar gornsae, oc'h erzerc'hañ e-tro an oad a 20 vloaz dre leiadur argammedek ar gweled ha gouliezoù adfeilhus ha laurus.

habenula TA ◇ **habenula** ◇ **sugell b.** Baliрад bihan steuñvenn wenn, daoudañvat, lodek en arzerc'hvel, loet e kreiz kein an derc'hvel, oc'h eren blein arak ar c'hourjadenn hag ar gouzerc'hvel.

habitus ◇ **habitus, habit** ◇ **anneuz b.** Arvan hollek un den, sellet evel oc'h erzerc'haat, dre vras, stad e vred, e neuzid, e staelad kevredigezh, h.a.; er Vezekniezh, stad e yec'hed pergen.

habronémose ◇ **habronemiasis** ◇ **habronemiaz g.** Kleñved devoudet gant un arvevad eus ar genad *Habronema*.

hachure, hachement ◇ **hacking** ◇ **chutoiñ, chutoad g.** Doare merata, anezhañ stokata ur parzh eus ar c'horf gant ribl a-helmo an dorn.

Haeckel : **loi de** ~ ◇ **Haeckel's law** ◇ **savelenn b. Haeckel** “Istor diorreadur an hinienn pe *unandarzh* ned eo nemet ur c'henderiñvad berr eus an hir a istor henouennoniel pe *hildarzh*”; dindan arzael emañ hevelep “savelenn” bet dezrevellet e 1868.

Hæmophilus ◇ **Haemophilus** ◇ **Haemophilus** Genad bakteri eus ar c'herentiad *Pasteurellaceae* a zo e spesad rizhek *H. Influenzae*; bazhellou diloc'h Gram-, aervevat hag anaervevat anret, o piaouañ un nitrat-reduktaz (sl. *Hæmophilus influenzae*).

Hæmophilus ducreyi, bacille de Ducrey ◇ **Haemophilus ducreyi, Ducrey's bacillus** ◇ **Haemophilus ducreyi, bazhell b. Ducrey** Bazhell spesadel al livant meizh (sl. *chancre mou*).

Hæmophilus influenzae ◇ **Haemophilus influenzae** ◇ **Haemophilus influenzae** Kokobazhell Gram- bezant e borc'hadoù fric'hargadenn klañvourion ar grip hag, alies ivez, e fri hag e korzailhenn ar gouzrec'hioù yac'h e-pad an darreuziadoù grip; spesad nad eo ket kiriek d'ar grip, nemet ez eo gwezher d'ar pilhonfo ha da boreadoù diseurt, a-wechoù en orin rouestladoù ar grip (sl. *vaccin anti-Hæmophilus*).

HAIRAN : **syndrome** ~ ◇ **HAIRAN syndrome** ◇ **azoniad HAIRAN** (HAIRAN, teskanv Sz. *hyperandrogenism – insulin resistance – acanthosis nigricans*, Br. *androgenusvec'h – insulinharzusted – acanthosis nigricans*) Strafulh enborc'hadel o tizhout ar maouezed, anezhañ kevret : kreoñegezh, akne, borlder, diabet c'hwec'h hag *acanthosis nigricans* (dermatoz naouus dre blakadoù hiperkeratoz gourlivegat sezet er plegoù bras).

halistèrese ◇ **halisteresis** ◇ **halisvec'h g.** Leiaat bec'h an halioù mein en eskern.

halitose, fætor ex ore ◇ **halitosis, stomatodysodia** ◇ **flaeranal g., louvanal g., louvc'henoù g.** C'hwezhe fall gant an anal (sl. *cacosmie objective, cacostomie*).

hallomégalie ◇ **hallomegaly** ◇ **keurveudegezh (troad) b., hallomegaliezh b.** Usvent ar meud troad.

hallucination ◇ **hallucination** ◇ **trezerc'hañ, trezerc'h g. -ioù** Derc'hañ dec'havaelet evel ur merzhout (*gaouvezhout*, Gl. *pseudopercep-tion*), ambreek pa ra diouer un dasselliñ dezvarnus; hervez ar skiantenn angorzhet e reer anv a *trezerc'hioù gwel-edel, klevedel, tañvael, c'hweshael, stokadel, emanglevadel* (sl. *cénestopathie*); hervez an ardarzh e tiforc'her : a) an *trezerc'hioù bonan* (Gl. *hallucinations physiologiques*) o c'hoarvezout ken e-kerz ar c'houk (*hunvreoù*), ken e deroù ar c'houk (*t. enhunel*, Gl. *h. hypnagogiques*) pe en dibenn (*t. ec'hunel*, Gl. *h. hypnopompiques*); b) an *trezerc'hioù pistriel* (alkool, drammoù, liaoù)

ha *pistiboreel* (toksinoù); c) an *trezerc'hioù anafel*, lodek e taolenn glinikel un tizhadur neuziadurel pe arc'hwelel a 'n nerveg (yoc'henn empenn, anaf gwazhiedel, daraez klopenn, droukfell, envedi); d) an *trezerc'hioù bredanaezel*, o tarvezout a-wechoù en neurozioù, dreist holl er psikozioù ma vezont peurliesañ gougevan ouzh un ambren (sl. *automatisme mental*).

hallucinogène, neurodysleptique ◇ **1 hallucinogenic 2 hallucinogen** ◇ **trezerc'heiat aa., nervvireüs aa., nervvireer aa. 2 trezerc'heiad g. -où, nervvireer g. -ioù** 1 O tec'han trezerc'hioù. 2 Danvezenn o tec'han trezerc'hioù.

hallucinose ◇ **hallucinosi** ◇ **rastrzerc'hañ, rastrezerc'h g. -ioù** Strafuilh heñvel ouzh an trezerc'hañ, gant an diforc'h m'en dezvarn ar gouziviad war an taol evel ur gaouvezhout; klasel eo skouer ar *rastrzerc'hañ troadempennel* (Gl. *hallucinosi pédonculaire*) diwar un anaf e troadoù an empenn, ma c'hoarvez gant ar c'hlañvour dec'havaelañ dre varradoù skeudennoù mut ha liviaouek tud, loened, traezoù.

hallux rigidus ◇ **hallux rigidus** ◇ **hallux rigidus, meud g. troad reut** Artroz tromaotus kenvell kreiztroad-oeñs ar meud troad.

hallux valgus ◇ **hallux valgus** ◇ **hallux valgus, meud troad ez-kamm** Gwariadur war ziaevaz a 'r meud troad gant gouzsvellad ar c'henvell kreiztroad-oeñs.

hallux varus ◇ **hallux varus** ◇ **hallux varus, meud troad enkamm** Gwariadur war ziabazh a 'r meud troad.

halogénide ◇ **halodermia** ◇ **halogenid g.** Darvoud kroc'hen devoudet gant un haluzenn (brom, klor, fluor, iod).

halophile ◇ **halophile** ◇ **halgar aa.** A-zivout ar bevion (bakteri, h.a.) o trigañ er prioù pinvidik a natriom.

hamartome ◇ **hamartoma** ◇ **hamartom g.** Kammneuiziad yoc'hennvanek naouus dre ur c'hementad reñverek pe ur staladur ezreol eus kelligoù reol e-barzh ur gwiad pe un organ (sl. *dystrophia, hétérotopie*).

Hamburger : **effet ou phénomène de ~** ◇ **Hamburger's interchange** ◇ **anadenn b. pe keveskemmad g. Hamburger** Ezteñ ion CO₃H⁻ hag enteñ ion Cl⁻ a-dreuz kennenn an hemati, lodek e trevnoù skurzer an hemoglobin o kendaolñ da zerc'hel ar c'hempouez trenkenn-bazenn er metoù diabarzh.

Hamolsky : **test de ~, T3 test** ◇ **in vitro uptake test** ◇ **prouad Hamolsky, proud T3** Araezad imboure'h arc'hwelel ar skoedenn, anezhañ andalañ bec'h an hormon skoedel (tiroksin pe T4) e-barzh ar proteinoù en dezoug : meskañ a reer in vitro gwad ar gouziviad gant ur c'hementad hormon skoedel T3 tiellet gant iod skinoberiek ; seul vrasoc'h kementad an hormon T3 andegerc'het gant ar proteinoù dezouger seul uheloc'h enno bec'h an tiroksin.

hanche ◇ **hip** ◇ **lez, d. divlez** Rann nezek an ezel traoñ, kenvell al lez en he c'hreiz.

handicap ◇ **handicap** ◇ **namm g.** Dianlen kedvuhez-el-micherel un divig pe un dic'housted (sl. *inaptitude, incapacité, invalidité*).

handicapé ◇ **handicapped person** ◇ **1 nammet aao. 2 nammed g. -idi** Den dilañset en e arc'hwelioù korfel pe vredel.

haploïde ou **haplo** ◇ **haploid** ◇ **haploïdel aa., haplo aa.** 1 A-zivout teskad kelligoù ar *germen*, ar gametoù, enno *n* kromozom (23 c'hromozom unat gant an den); pep kromozom eus ar spergellig a gav e geñvereg er vigellig hag amparañ gantañ ur re — diwar se e sav da 2 *n* niver kromozomou ar vi frouezhiget, 23 re gant an den. 2 A-zivout gouziviad ar *vonozomiezh*, o tioueriñ, en holl pe a-zarn, unan eus kromozomou ur re; da aroueziñ ar gouskoed, e lostgerier ar gerzenn *haplo* gant merk (X, Y pe niverenn) ar c'hromozom unat, sk. : *haplo X* (azoniad Turner), *haplo 21* (kleñved garm ar c'hazh).

haptène ◇ **haptén** ◇ **haptén g.** Unan eus an div elfenn a ya d'ober un antigen, anezhi un danvezenn a dolz mol izel (ur polisakarid peurliesañ), piaouel he luniad da bep antigen hag o tebarañ dezhañ e spesadelezh; an haptén eo a zaggwered ouzh an antikorf met ne c'hell ket dec'han furmidigezh an antikorf drezañ e unan; houmañ a ampleg ma ve kevredet an haptén gant un danvezenn brotided pe polisakaridek, ar *simiad* (Gl. *porteur, Sz. carrier*) (sl. *anticorps, antigène*).

haptoglobine ◇ **haptoglobin** ◇ **haptoglobin g.** Mukoprotein bezant e plasma ar gwad, eus stroll ar globulinoù α₂ hag en arez da gediañ gant an hemoglobin; usvec'hiek e vez e-kerz ar poredoù, kleñvedoù ar c'hollagen hag an holl geuziadoù gouzañvet gant ar bevedeg, isvec'hiek en eneb e dianlen ar gwadlozañ; e wadvec'h a zewerzher dre ar *feuriader haptoglobin* (Gl. *indice d'haptoglobine*), reol etre 0,3 hag 1,2, o sevel ent kleñvedel betek 8,5.

(-)**harmoni-**

• *analyse harmonique* elfennerezh dazuc'hadel (Fizik) • *développement harmonieuse-ment organisé* diorreadur hedrevn • *dysharmonie dentomaxillaire* digengann dent-aven • *dysharmonie évolutive* digengann an emdreñ • *enchaîner harmonieusement les syllabes* kemalañ heneuz al leñvennoù • *harmonique* dazuc'had (Fizik) • *harmonique* kemblac'hek, a-gemblac'h (Jedoniezh) • *harmoniser* kengenniñ • *l'harmonie entre les choses et les pensées* kengannadur an traoù hag an dezevoù • *le jeu harmonieux de l'imagination et de l'entendement* c'hoari kengannus an dec'hmegeañ hag an ervedañ.

Haserick : **rosette de ~** ◇ **rosette of leucocytes** ◇ **rodig b. Haserick, rodig leukokit** Tolzenn vihan arfont, bazennel, ezkelligel ha gronnet klok gant ur gwiskad granulokit, bezant e-barzh gwad ha mel eskern gouziviaded al lupuz eritematus strewek.

Hashimoto : **goitre lymphomateux de ~, thyroïdite ou thyroïdose chronique de ~, thyroïdose involutive** ◇ **Hashimoto's disease** ◇ **pennsac'h g. limfomatus Hashimoto, tiroïdoz g. henek Hashimoto, kleñved Hashimoto, tiroïdoz atroat** Kleñved a-wechoù familhel, naouus *ent neuziadurel* dre ensiladur limfokit ha skleroz leiek ar skoedenn, *ent klinikel* dre ur pennsac'h strewek kalet kevret gant arouezioù gougel miksedem, o tizhout ar maouezed en o ragezizkvan, *ent ardarzhel* dre un anadenn unanhangeañ, ar skoedenn o vezañ gwazhet gant unanantikorfoù antiskoedenn diwanet da heul un ec'hwazhiad tiroglobulin, *ent vevoniel*, dre usvec'h an tireostimulin (TSH), an antikorfoù antitiroglobulin hag antitiroperoksidaz.

haustral ◇ **haustral** ◇ **gobellel** aa. A-zave d'ar gobelloù.

haustrations ◇ **haustration**, **sacculation** ◇ **gobelladur** g. Heuliad gobelloù a 'r c'holon.

hastrum, **haustration** ◇ **hastrum**, l. **haustra** ◇ **gobell** b. -où Unan eus an oglezhoù o reiñ ar steudad anezho un neuz volbosek d'ar c'holon.

haut(-)

• *anticorps de haute affinité* antikorfoù gourlontek • *atteinte bilatérale de la moelle épinière limitée en haut et en bas* tizhad daoudu ar mel a-livenn bevennet en nec'h hag en traoñ • *hauteur d'un son* uc'hder ur son • *la partie haute du pédoncule cérébral* lodenn grec'h troad an empenn • *transférer plus haut la commissure des paupières* treuzlec'hiañ war grec'h freill ar malvennoù.

Havers : **canal de** ~ ◇ **haversian canal**, **nutrient canal** ◇ **kanol** b. **Havers** Kanol vager an askorn, enni an nervennoù hag ar gwazhied anezhañ, loet e-kreiz an osteon (sl. *ostéon*).

haversite ◇ ◇ **haversfo** g. Tanijenn kanolioù Havers.

havresac : **syndrome du** ~ ◇ ◇ **azoniad ar sac'h kein** Seizi plezhad ar vrec'h e dianlen an amwask gant brikoù ur sac'h kein.

hébéphrénie ◇ **hebephrenia** ◇ **hebefreniezh** b. Furm ar skizofreniezh o tizhout ar grennarded, naouus dre un deroù manguñ hag argammedek (diaesterioù skolel, skuizhnez, hipokondriezh), buanded an dedreiñ etrezek an diskloañ, koll an hambout (didenn diouz ar gedvuhez ha danzen reizhiadoù ideologek skiantel, politikel, trabedel antraek ha dislenadec); deskrivet ez eus bet meur a daolenn glinikel hervez trec'hded an azoniadoù o tont a-wel e-kerz an dedroadur : *ankewant* argreskus gant aneroug, *realezh vibilius*, kuladoù ha digasted ouzh an amgen, *argizañ* avloc'h hag adizh etrezek un dic'hwitadur envediek herrek — hemañ a voe orin an anvad *dementia praecox* (*envedi gentrat*) a lakaas Kraepelin war ar c'hleñved e 1895 (sl. *apathie*, *contact*, *discordance*, *indifférence*).

hébéphrénocatatonie ◇ **hebephrenocatonia** ◇ **hebefrenokatatoniezh** b. Furm c'hrevus ar skizofreniezh o kevredañ strafuilhoù an hebefreniezh hag ar gatatoniezh; lezet hep mezegadur, e tedro d'an envedi dindan 3 pe 4 bloaz (sl. *catatonie*, *hébéphrénie*, *schizophrénie*).

Heberden : **rhumatisme d'Heberden** ◇ **Heberden's disease** ◇ **remm** g. **Heberden** Remm henek o tizhout kenvelloù etreeñsel pellek bizied an daouarn, naouus dre anhebleg an oñsoù ha dre greskennoù o tisneuziañ an eskern (*ozvennoù Heberden*, Gl. *nodosités d'Heberden*); e kevarguz emañ an arbennelezh : aozerion a wel eno anafoù artrozel bepred, re all erzerc'hadoù ivez eus al liesarzfo rumatoidel pe eus an urloù.

hébétude ◇ **hebetude** ◇ **saouzan** g., **saouzanegzh** b. Stad vred naouus dre duzumadur an arc'hwelioù kefredel hep steuz an arc'hwelioù skiantennel, kentañ derez ar malouen (sl. *stupeur*).

hédrocèle ◇ **hydrocele** ◇ **fraezhogad** g. Avelenn enni kilblegou a 'r pervez o valirañ dre ar fraezh hag o tisvountañ dirazo ar youlc'h islinket.

Heerfordt : **syndrome de** ~ ◇ **Heerfordt's syndrome** ◇ **azoniad Heerfordt** Anez terzhiennek naouus dre anafoù foel ar wazhiedsae, ar c'hilvoc'hennoù ha gwagrennoù an daeroù, seizi an dremm ha, dibaotoc'h, seizi nervennoù klopennel all (III ha VI), kevret gant un erwez pilhnel; hogos bepred e vez arlenadoù : anafoù lagad ha strafuilhoù ar gweled; desellet eo evel un erzerc'had eus kleñved Besnier-Boeck-Schaumann.

Heimlich : **manceuvre** ou **méthode de** ~ ◇ **Heimlich's maneuver** ◇ **kefleuñvad** g. **Heimlich** Kefleuñvad amkanet da barraat ouzh ur mougañ marvus diwar stankadur ar c'harloc'henn gant tammoù boued dewentet dre zarvoud, anezhañ disvountañ ar gelc'hspereunn war grec'h dre bouezañ trumm ha kreñv war an argreuzenn evit lakaat aer ar skevent da argas ar c'horf estren.

Heine-Medin : **maladie de** ~ ◇ **acute anterior poliomyelitis**, **Heine-Medin disease** ◇ **kleñved Heine-Medin**, **louetvelfo** g. **lemm araok** Pore darreuziat ha tredizhus diwar ur poliovirus o tizhout ar vugale hag an oadourion yaouank, naouus, *ent neuziadurel* dre wazhadur kerniel araok ar mel a-livenn, *ent klinikel* dre an adañ trumm, goude un nebeut devezhioù terzhiennek ha klopennostoù, eus seizioù gwak diseurt en o lec'hiadur hag en o astenn; war istefiñvañ ez a ar c'higennoù seizes ha paouez a ra a ziorren an eskern keñverek en ur zec'han disneuziadoù diwezhel; deskrivañ a reer lec'hiadurioù nerval all, en hirvel, en empenn (*louedempennfo*, Gl. *polio-encéphalite*) o tizhout gouziviaded koshoc'h, grevusoc'h eget ar furmoù bugelel, o lezel avat arlenadoù skañvoc'h, ivez furmoù nerval hep seizi, pilhnel, kuñv, furmoù leiek, gripvanek, pervezel pe fric'hargadennel, erfin furmoù diazon, ar re-mañ oc'h ober 98 % eus ar poreadoù dre boliovirus; kleñved erguret dre ar vaksinañ (sl. *poliovirus*, *vaccin antipoliomyélitique*).

hélicase ◇ **helicase** ◇ **helikaz** g. Enzim o treluskañ disparti div widenn an DNA dre derrañ an ereoù hidrogen koubler an daouadoù bazennoù (sl. *base 3*, *désoxyribonucléique* : *acide* ~).

Helicobacter pylori ◇ **Helicobacter pylori** ◇ **Helicobacter pylori** Anvad nevez *Campylobacter pylori*, bet lakaet war wel e giriegezh er c'hreuzfo hag en angreizh kreuzdaouezenn e 1984 gant daou vezeg aostralian, Robin Warren ha Barry Marshall (priz Nobel e 2005).

héliodermite ◇ **dermatitis solaris** ◇ **heolgroc'henfo** g. Anvad rumm an anaezioù kroc'hen diwar ardizh skinoù an heol; un heolgroc'henfo lemm eo an taol heol.

héliopathie ◇ **heliopathia** ◇ **heolanaez** g. Anvad rumm an anaezioù devoudet gant skinoù an heol.

héliophobie ◇ **heliophobia** ◇ **1 heolgaz g. 2 heolarur g.** 1 Aon rak ardizh skinoù an heol en abeg d'ur gizidigezh reñverek a `r c'hroc'hen. 2 Amgren neurozek da vont en ardizh skinoù an heol.

héliothérapie ◇ **heliotherapy** ◇ **heolgurañ** Arloañ yac'hadel skinoù an heol.

héliotropisme ◇ **heliotropism** ◇ **heolgerc'hañ, heolgerc'h g.** Perzh ar protoplasm da vezañ dedennet pe gaset gant skinoù an heol (*heolgerc'hañ yaek* pe *nac'hek*).

helminthes ◇ **helminths** ◇ **helmint s.** Anvad rumm ar preñved arvevat ouzh an dud hag al loened, rannet e kevrennad ar *Plathelminth* (preñved plat), isrannet en urzhadoù an *Trematod* hag ar *C'hestod*, ha kevrennad an *Nemathelminth* (preñved ront) (sl. *Cestodes, Distomes, Nématodes, Oxyures, Taenia, Trématodes*).

NOTENN : An termenou amouiziel *lenkern* ha *kest* a denn da arouezñ, hemañ ar preñved munut a seurt gant an *oksiur*, hennezh ar preñved hir a seurt gant an *askariz* pe an *tenia*.

helminthiase ◇ **helminthiasis** ◇ **helmintiaz g.** Anaez devoudet gant an helmint.

helminthologie ◇ **helminthology** ◇ **helmintouriezh b.** Studi a `n helmint ha peurgetket a `r preñved pervezat hag ar strafuilhoù a zevoudont.

hélodermie ◇ **helosis** ◇ **heloz g.** Ozvennoù karnek, dilaur peurliesañ, kresket diwar gein ar c'henvelloù etre-oeñsoù ha kreizdorn-oeñsoù, kevret a-wechoù gant angrizadur lienstirenoù ar palv hag ar sol.

hémagglutination ◇ **haemagglutination** ◇ **hematizazgludañ** Dazgludañ an hemati dre an aglutininoù spesadel (antikorfoù o tazgwerediñ ouzh an antigen keñverek douget gant an hemati) pe anspesadel (aglutininoù paret gant bakteri pe viruzoù, *Miksovirus* dreist holl); an *hematizazgludañ gouzañvat*, amkanet da zinoñ bezañ un antigen, a brierter dre lenañ ent kalvezadel ouzh an hemati an antigenoù hezleizh keñverek.

hémanoendothéliome ◇ **haemangioendothelioma** ◇ **hemangioendoteliom g.** Yoc'henn, yud a-wechoù, evodet diouzh endotelienn ar c'horrwazhiad.

hémaphèrese, aphèrese ◇ **haemapheresis** ◇ **gwadedrannañ, edrannañ** Dispartiañ ur parzh eus ar gwad (elfenn luniek pe plasma) diouzh ar parzhioù all ha daskoriñ ar re-mañ d'ar gouziviad (sl. *cytaphèrese, érythraphèrese, leucaphèrese, plasmaphèrese*).

hémarthrose ◇ **haemarthrosis** ◇ **arzwadad g.** Fennad gwad e kavenn ur c'henvell.

hématémèse ◇ **haematemesis** ◇ **gwadc'hweliñ** C'hweliñ gwad, forzh pe orin a ve dezhañ (stomok, treizher, gwad lonket).

hémathidrose, hématidrose, sueur de sang ◇ **hematidrosis** ◇ **gwadc'hweziñ** Strafuilh ar borc'hañ c'hwez, naous dre livrezh ruz hemañ.

hématics, globules rouges, érythrocytes ◇ **erythrocytes, red blood corpuscles, red (blood) cells** ◇ **kelligoù l. (b.) ruz, ruzkelligoù, hemati s., eritrokrit s.** Kelligoù eus ar gwad, digraoñell, e stumm un disk daouargevek etre 7,2 hag 8,3 µm treuzkiz, o niver keitat 5 milion dre mm³ gant ar gwaz ha 4,5 milion gant ar vaouez, o c'hefridi bennañ dezougen eus ar skevent d'ar gwiadoù an oksigen lenet ouzh an hemoglobin bezant enno (sl. *drépanocyte, érythro-blastes, hémoglobine*).

hématimètre ◇ **haemacytometer** ◇ **hematimetr g.** Ardivink o talvout da zewerzhañ ar feur dre mm³ eus pep kellig a `r gwad, anezhañ ur poull plat anav e ec'honad kleuzet en ul lavnenn wer tev, a skuilhaer ennañ un dakenn wad kent e glozañ gant ul lavnennig hag e zodiñ dindan amkanell ar c'horrgresker.

hématine, ferriporphyrine ◇ **haematin** ◇ **hematin g.** Hem a zo bet treuzfurmet ennañ an houarn houarnus, divamsavus, e houarn houarnek, teiramsavus, diaraez da zezougen oksigen.

hématique ◇ **haematic** ◇ **gwadel aa.** A-zave d'ar gwad.

hématique : crise ~ ◇ **haematic crisis** ◇ **eizigenn b. wadel** Kresk niver an eritroblast ha, da heul, kresk niver an eritrokrit o c'hoarvezout goude ar gwadliñvoù hag ar c'hleñvedoù lemm.

hématocèle ◇ **haematocèle** ◇ **gwadvozhell b.** Gwadliñvad enkistet, en organoù genel peurliesañ, gant ar gwaz : g. *ar gousac'h* (Gl. *h. scrotale*), g. *ar c'houinsae* (Gl. *h. vaginale*), g. *ar funig sper* (Gl. *h. funiculaire*), g. *enklidemel* (Gl. *h. intratesticulaire*), gant ar vaouez : *h. tro-* pe *drek-kroz* (Gl. *h. péri-* pe *rétro-utérine*), er c'hleuz youlc'h-kroz pergen (g. *an ouf*), dec'honet gant fregadenn ur vec'hiegi ezkrozhat; notañ ivez degouezhioù eus *gwadvozhell ar gouzoug* (Gl. *hématocèle du cou*).

hématocolpos ◇ **haematocolpos** ◇ **gouinwadad g.** Tolzennad wad a `r mizioù azdalc'het er gouin e dianlen antreorc'h al lienenn gourzh pe anvoll faout ar c'hourzh.

hématocrite ◇ **haematocrit** ◇ **hematokrit g.** 1 Ardivink arveret da vuzuliañ ec'honad an hemati a-genfeur da hini ar gwad, anezhañ ur gorzenn wer ma tispartier dre dronizhañ ar c'helligoù ruz diouzh ar plasma; ent reol ez a ar c'helligoù ruz d'ober 45 % eus ec'honad gwad ar wazed, etre 38 ha 42 % eus ec'honad gwad ar maouezed. 2 Dre astenn ster, e reer *hematokrit* ivez eus dregantad an hemati en ec'honad ar gwad.

hématodermie ◇ **cutaneous lymphoma** ◇ **limfom g. amwiskadel** Anvad rumm an anafoù kroc'hen ha glourgenn, yud peurvuañ, naous dre un neridigezh kelligoù evodet diouzh an ac'hadoù gwadparañ e-kerz kleñvedoù ar gwad (leukemiezh, retikuloz, retikulosarkom, kleñved Hodgkin, mikoziz fongoidel, kleñved Kaposi, azoniad Sezary, h.a.).

hématogène ◇ **haematogenous** ◇ **gwadien aa.** E dalc'h ar gwad, dec'honet gant amred ar gwad, sk. : *strewidigezh wadien ar garvevion*.

- hématologie** ◇ **haematology** ◇ **Gwadouriezh** b. Diskiblezh vezegel o plediñ gant ar gwad en diarselloù neuziadurel, bevedourel ha kleñvedourel.
- hématologie géographique** ◇ **geographic haematology** ◇ **Gwadoniezh** b. **douaregorel** Studi stadegel naouusterioù gwad ar poblañsoù hervez o dasparzh en douaregor, diskiblezh o pourchas stlenn d'an Denoniezh, d'an Drevoniezh, d'ar Vezekniezh, d'an Istor (rann studi anvet *Gwadoniezh istorel*).
- hémotome** ◇ **haematoma** ◇ **gwatoñv** g. Hogennad gwad enkistet; hervez al lec'h iadur e tiforc'her : ar *g. drek-torzhenn* (Gl. *h. rétroplacentaire*), hogennad gwad o tispegañ an dorzhienn a-zarn pe a-bezh diouzh ar grozh, darvoud grevus eus mizioù diwezhañ ar vrazedded; ar *g. is-tev* (Gl. *h. sous-dural*), etre ar bilhonenn dev hag ar gevnodegenn; ar *g. talmus* (Gl. *h. pulsatile*), amparet gant ar gwad o fennañ diouzh un dalmerenn; ar *g. tro-c'henel* (Gl. *h. périgénital*), en dro d'an organoù genel da geñver ar gwilioud; ar *g. tro-lounezh* (Gl. *h. périrénal*), fennadur gwad daraezel dindan bourc'had al lounezh; ar *g. war-dev* (Gl. *h. extradural*), etre ar bilhonenn dev hag eskern ar c'hloppenn (sl. *dissection aortique*).
- hématomètre, hématométrie** ◇ **haematometra** ◇ **krozhwadad** g. Tolzenn heñvel ouzh ur yoc'henn, amparet gant gwad ar mizioù azdalc'het ebarzh kavenn ar grozh e dianlen anvoll gouzoug ar grozh pe beurangwe ar gouin.
- hématomyélie** ◇ **haematomyelia** ◇ **melwadad** g. Gwadiñv er mel a-livenn, sezet peurvuiañ er steuñvenn louet.
- hématopelvis** ◇ **haematopelvis** ◇ **lestrwadad** g. Hogennad gwad el lestr.
- 1 hématophagie, érythrophagocytose, érythrophagie** **2 hématophagie, hémophagie** ◇ **1 erythrophagia, hemophagia** **2 haematophagia** ◇ **1 eritrofagiezh** b. **2 gwadezadeg** b. 1 Fagokitoz an hemati. 2 Emveañ diwar gwad ul loen all.
- hématophobie, hémophobie** ◇ **haematophobia** ◇ **gwadarur** g. Aon neurozek rak ar gwad.
- hématopoïèse** ◇ **haematopoiesis** ◇ **gwadparañ** Furmiñ kelligoù ar gwad.
- hématopoïétique : organes** ~s ◇ **haematopoietic organs** ◇ **organoù gwadparañ** Organoù ma furn kelligoù ar gwad (mel eskern, gwiadoù limfoïdel).
- hémator(r)achis** ◇ **haemorrhachis** ◇ **livennwadad** g. Gwadiñv enlivennat o tont eus godoù al livenn pe eus ar pilhon.
- hématosalpinx** ◇ **haematosalpinx** ◇ **korzennwadad** g. Gwatoñv e-barzh korzenn ar grozh e dianlen ur vec'hiegi ezkrozhat pe azdalc'h gwad ar mizioù diwar anvoll an *ostium uterinum* (igorenn ar gorzenn er grozh).
- hémotose** ◇ **haematosis** ◇ **hematoz** g. Argerzh treuzfurmiñ ar gwad gwazhiennel e gwad talmerel e-barzh ar skevent (lenadur an oksigen, ezvevnenadur ar CO₂).
- hématospermie, hémospemie** ◇ **haematospermia** ◇ **sperwadegezh** b. Bezañs gwad er sper da geñver an derodiñ.
- hématotympan, hémotympan** ◇ **haematotympanum** ◇ **taboulinwadad** g. Fennad gwad e-barzh kavenn an daboulin, o tarvezout a-wechoù goude torr ar garregenn.
- hématozoaire** ◇ **haematozoon** ◇ **hematozoenn** b. (l. **hematozoed**) Protozoenn arvevat o trigañ er gwad, sk. : ar *Plasmodium*, gwezher ar baludegezh.
- hématurie** ◇ **haematuria** ◇ **troazhwadegezh** b. Bezañs gwad en troazh da geñver an dezioulañ (>10⁴ a hemati/min).
- hème** ◇ **haem**, SzAm. **hem** ◇ **hem** g. Deverad houarnus diwar ar protoporfirin, elfenn barzhiat en amparadur an hemogloblin dezhi da arc'hwel kediañ ent eiltroüs gant an oksigen.
- héméralopie, amblyopie crépusculaire, cécité nocturne, hespéranopie** ◇ **nyctalopia** ◇ **bouc'hwel** g. **amheol, bouc'hwel issked, dallder** g. **amheol, dallder issked** Leiadur al lemmded weled pa c'houziz ar gouloù (sl. *amblyopie, cécité*).
- hémiachromatopsie** ◇ **hemiachromatopsia** ◇ **livledangwel** g. Ledangwel evit al livioù (sl. *achromatopsie*).
- hémiagnosie** ◇ **hemiagnosia** ◇ **ledandenaoud** g. Andenaoud en un hanter eus ar c'horf.
- hémianesthésie** ◇ **hemiaesthesia** ◇ **ledaneraez** g. Aneraez en un hanter eus ar c'horf.
- hémianopsie, hémianopie** ◇ **hemianopia, hemianopsia** ◇ **ledangwel** g. Dallder, eleze gwanadur pe koll ar gweled en un hanterenn eus gwelvaez ul lagad pe, peurliesañ, an daou lagad, e dalc'h un anaf er forzhioù gweled : nervennoù ar gweled, gweltre pe forzhioù gweled drek-gweltre; hervez an hanterenn tizhet (kleiz pe dehou, krec'h pe traoñ) e tiforc'her lies seurtad ledangwel.
- hémianopsie altitudinale** ◇ **altitudinal hemianopia** ◇ **ledangwel diarez** Ledangwel a zo a-zremm gantañ ar vevenn etre ar gwelvaezioù hewelek hag angeleek; daou seurtad anezhañ : al *ledangwel diarez krec'h* (Gl. *hemi-anopsie altitudinale supérieure*), al *ledangwel diarez traoñ* (Gl. *hémianopsie altitudinale inférieure*).
- hémianopsie binasale** ◇ **binasal hemianopia** ◇ **ledangwel ensko** Ledangwel diavann diunsko, anezhañ dallder hanterennou diabarzh (a-fri) ar gwelvaezioù.
- hémianopsie bitemporale** ◇ **bitemporal hemianopia** ◇ **ledangwel ezsko** Ledangwel diavann diunsko, anezhañ dallder hanterennou diavaez (a-ividig) ar gwelvaezioù, divigad naouus d'un anaf e rannbarzh ar gweltre, lec'h ma kroazigell ar gwiennoù gweled.
- hémianopsie congruente** ◇ **congruous hemianopia** ◇ **ledangwel keweze** Ledangwel unsko ma 'z eo unstumm hag unastenn an dachenn dallder en daou lagad.
- hémianopsie en quadrant** ◇ **quadrantanopia** ◇ **kardangwel** g. Ledangwel ma 'z eo stumm an dachenn dallder, n'eo ket un hanterenn, met ur bevarenn gelañ.

- hémianopsie en secteur** ◇ **sector-shaped homonymous scotoma** ◇ **ledangwel gennadek unsko, skotom g. gennadek unsko, gennadangwel g.** Tachenn dallder, dezhi naouster ul ledangwel unsko, e stumm ur gennad kwez e gwelvaez an daou lagad.
- hémianopsie en scotome** ◇ **homonymous hemianopic scotoma** ◇ **ledangwel skotomek unsko, skotom ledangwel-ek** Tachenn dallder ledangwelek unsko, bihanvent peurliesañ ha nes-kreiz.
- hémianopsie hétéronyme** ◇ **heteronymous hemianopia** ◇ **ledangwel diunsko** Anvad genadel evit al *ledangweliou ensko* hag *ezsko*.
- hémianopsie homonyme** ◇ **homonymous hemianopia** ◇ **ledangwel unsko** Ledangwel o tougen war hanterenn diabarzh an eil lagad ha hanterenn diavaez egile, divigad azonus d'un anaf er forzhioù gweled drek-gweltre; e se e tiforc'her al *ledangwel unsko dehou* ha *ledangwel unsko kleiz*.
- hémianopsie incongruente** ◇ **incongruous hemianopia** ◇ **ledangwel ankewez** Ledangwel unsko ma n'eo ket unstumm nag unastenn an dachenn dall en daou lagad.
- hémianopsie latérale** ◇ **lateral hemianopia** ◇ **ledangwel diarez** Ledangwel a zo a-zerc'h gantañ ar vevenn etre ar gwelvaezioù hewekek hag angwekek; daou seurtad dezhañ : al *ledangwel unsko* (Gl. *hémianopsie laté-rale homonyme*), al *ledangwel diunsko* (Gl. *hémianopsie latérale hétéro-nyme*), daou seurtad da hemañ : al *ledangwel ensko* hag al *ledangwel ezsko*.
- hémianosmie** ◇ **hemianosmia** ◇ **ledanc'hwesa g.** Koll ar c'hwesa diouzh un tu.
- hémiasynergie** ◇ **hemiasynergia** ◇ **ledankedal g.** Ankedal o tizhout un hanterenn eus ar c'horf a stader pa vez anafoù untu en ilpenn hag er stiradoù livenn-ilpenn.
- hémiaxie** ◇ **hemiatxia** ◇ **ledankedre g.** Koll ar genurzh er fiñval diarvenn stadet a-wechoù en hanterenn gorf tizhet gant ul ledseizi diglok.
- hémiathétose** ◇ **hemiathetosis** ◇ **ledatetoz g.** Atetoz en un hanterenn hepken eus ar c'horf.
- hémiballisme, syndrome du corps de Luys** ◇ **hemiballism** ◇ **ledvallegezh b.** Azoniad a-geñver gant un anaf er gronn endan-derc'hvel, o c'hoarvezout a fiñvoù andiarvenn, ampl, taer ha dizurzhiek en un hanterenn eus ar c'horf, kevret a-wechoù gant strafuilhoù bred ha direizhoù struzhel; deraouiñ a ra trumm hag e tedro herrek etrezek ar marv (sl. *ballisme, biballisme*).
- hémibloc** ◇ **hemiblock** ◇ **hanterdolc'had g.** Seurtad strafuilh an nerven enkofigel diwar an astal en ur stirad eus barr kleiz an hordenn gentez kofig; an aliesañ eo an *hanterdolc'had kleiz arak*; kevrediñ a ra a-wechoù an daou hanterdolc'had o tisoc'h en un *tolc'had daoustirad* hag un *tolc'had barr klok* (sl. *bloc cardiaque, bloc de branche*).
- hémichorée** ◇ **hemichorea** ◇ **ledkorea g.** Fiñvoù koreek en un hanterenn eus ar c'horf (sl. *chorée*).
- hémicraniose** ◇ **hemicraniosis** ◇ **hemikranioz g.** Usteñv eus un hanterenn a 'r c'hlopenn hag a 'n dremm, kevret gant azonou empennel pe bilhonet (kloppenmostoù, c'hweladoù, glizi, h.a.), dec'hanet gant dedaoladoù sarkomatus diwar ar bilhonenn dev.
- hémidroze, hémidiaphorèse** ◇ **hemidiaphoresis, hemidrosis** ◇ **ledusc'hwez g.** Reñver ar c'hwezparañ en un hanterenn eus ar c'horf.
- hémidysesthésie** ◇ **hemidysaesthesia** ◇ **ledvieraez g.** Strafuilh a 'n eraeziñ stokadel en un hanterenn eus ar c'horf.
- héminégligence, négligence spatiale unilatérale** ◇ **hemineglect, hemispatial neglect** ◇ **ledandeur g., andeur g. ledegorel** Azoniad nervredel kevret a-wechoù gant al ledseizi kleiz : dic'houzvez ha diseblant e vez ar gouziviad ouzh tu kleiz e amved, adalek hanterenn gleiz e gorf betek an traoù hag an dud loet a-gleiz dezhañ.
- hémioapie** ◇ **hemioopia** ◇ **ledwel g.** Doare all d'ober anv eus al ledangwel, dre zitouriñ ar parzh hewekek eus ar gwelvaez ha n'eo ket ar parzh angwekek.
- hémiparacousie** ◇ **hemiparacusia** ◇ **ledkammglev g.** Steneraeziñ ezreol diouzh un tu.
- hémiparésie** ◇ **hemiparesis** ◇ **ledc'houseizi g.** Leiäd nervien a 'n nerzh kigenel en un hanterenn eus ar c'horf.
- hémiparesthésie** ◇ **hemiparesthesia** ◇ **ledkammeraez g., ledvieraez g.** Strafuilh ar stokeraeziñ en un hanterenn eus ar c'horf (sl. *dyssthésie, parsthésie*).
- hémipareunie** ◇ **hemipareunia** ◇ **darnembar g.** Embarañ diglok e dianlen kammneuziadur an organoù genel benevel.
- hémiplégie** ◇ **hemiplegia** ◇ **ledseizi g.** Seizi klok pe diglok o tizhout un hanterenn gorf a-bezh pe a-zarn (sl. *alterne : paralysis* ~, *bulbaire : syndrome(s)* ~).
- hémiplégie capsulaire** ◇ **capsular hemiplegia** ◇ **ledseizi pourc'hadel** Ledseizi hollet hag ingal diwar ur gwadliñv er pourc'had diabarzh.
- hémiplégie cérébrale infantile** ◇ **infantile hemiplegia** ◇ **ledseizi mabanel** Ledseizi o tarvezout ken abred ha dibenn ar bloavezh kentañ, dasstrizhek war astenn en ezel traoñ, war bleg en ezel krec'h, arlenad diwar anafoù empenn gouzañvet da geñver ar gwilioud pe un empennaoued a 'r vabaned; dilañsañ a ra kresk ha teñvegezh an ilizi gwazhet.
- hémiplégie controlatérale** ◇ **controlateral hemiplegia** ◇ **ledseizi a-eiltu** Ledseizi o sezañ en tu kevenep d'un anaf empenn.
- hémiplégie corticale** ◇ **cortical hemiplegia** ◇ **ledseizi pluskennel** Ledseizi darnel alies, diwar ur boukadur er bluskenn empenn, kevret a-wechoù gant strafuilhoù ar santout, ar c'homz, ar gweled ha gant barradoù glizi.

- hémiplégie homolatérale** ou **collatérale** ◇ **homolateral** or **collateral hemiplegia** ◇ **ledseizi a-gendu** Ledseizi o sezañ e tu end-eeun an anaf empenn.
- hémiplégie proportionnelle** ◇ **proportional hemiplegia** ◇ **ledseizi ingal** Ledseizi m'emañ a zonder kevatal gantañ gwazhadur an dremm, an ezel krec'h hag an ezel traoñ.
- hémiplégie spinale** ◇ **spinal hemiplegia** ◇ **ledseizi livennel** Ledseizi diwar un anaf en un hanterenn eus ar mel dreist bolzadur ar gouzoug, naouus dre vonaded an dremm, ul ledseizi e tu an anaf, un aneraez en tu all (sl. *Brown-Séquard : syndrome de ~*).
- Hémiptères** ◇ **Hemiptera** ◇ **Hemipter s.** Urzhad amprevaned daou re eskell dezho, brazher, gwadezat, gougevret outi al louezae (sl. *Cimex lectularius*).
- hémispasme facial** ◇ **facial hemispasm** ◇ **ledandag g. an dremm** Azoniad naouus dre varradoù argrezañ lec'higek da gentañ hag oc'h aloubiñ prim holl gigennoù un hanterenn eus an dremm; deskrivañ a reer ur furn hennadek o trediñ war ar bloavezhioù hag ur furn eilvedel d'ur seizi a'n dremm.
- hémisphère cérébelleux** ◇ **cerebellar hemisphere** ◇ **hanterenn b. ilpenn** Pep hini eus div dolbezenn gostezel an ilpenn en daou du d'ar preñv (sl. *cervelet*).
- hémisphère cérébral** ◇ **cerebral hemisphere** ◇ **hanterenn empenn** Tolzenn wiad navel enklouennel disrannet diouzh an hanterenn all gant falc'h an empenn ha diouzh an ilpenn gant an telt anezhañ, ouzh he ober ur bluskenn ha gronnoù diaz a steuñvenn louet, steuñvenn wenn etrezo (sl. *cerveau*).
- hémisphérectomie** ◇ **hemispherectomy** ◇ **hanterennezvenañ, ezvenañ ledempenn, ledempennezvenañ** Dilemel un hanterenn empenn hollel (nemet an derc'hvel) pe darnel, ergemennet ouzh ar yoc'hennoù pe an angiomoù ledek pe, dreist holl ouzh al ledseizi mabanel.
- hémisynthèse, semi-synthèse** ◇ **semisynthesis, hemisynthesis** ◇ **damegevanaozañ, damegevanaoz g.** Treuzfurmiñ ur molekul a orin naturel evit ober anezhañ ur c'hediad kimiek nevez.
- hémithermie** ◇ **hemithermia** ◇ **ledwrester g.** Gwrezverk uheloc'h en tu seizet gant gouziviaded al ledseizi diwar orc'had.
- hémithyroïdectomie** ◇ **hemithyroidectomy** ◇ **ezvenañ ledskoedenn, ledskoedennezvenañ** Dilemel unan eus div dolbezenn ar skoedenn.
- hémitruncus** ◇ **hemitruncus** ◇ **hemitronkuz g.** Anpar unan eus barroù kef ar skevent; eroueriet eo ar skeventenn geñverek gant ur barr anreol eus an aortenn a-sevel.
- hémizygote** ◇ **hemizygous, hemizygotic** ◇ **anreek aa.** A-zivout ar gourev, nad eo ket enta e gromozom X lodek en ur re, dre se na c'hell bezañ nag unreek nag allreek evit a sell nep genenn loet war an kez kromozom, ken e vez erzerc'het bepred an doarennoù e dalc'h gen hemañ, hag int trec'hpek pe enkilek (sl. *gène, gonosome, hétérozygote, homozygote*).
- hémobilité** ◇ **haematobilia** ◇ **bestlwadad g.** Gwadiñv dre ar forzhioù bestl, lies devouderezh dezhañ : daraez, yoc'henn a'n avu pe a'r forzhioù bestl, bestlgellennfo lemm, angwaziad ar gellenn, gouliez glaourgenn ar forzhioù bestl e dianlen treankadur ur c'hrouanenn.
- hémobiologiste** ◇ **haemobiologist** ◇ **gwadvevoniour g. -ion** Bevoniour arbennikaet er Wadouriezh.
- hémocholécyste** ◇ **haemocholecystis** ◇ **bestlgellennwadad g.** Fennadur gwadiñvek er gellenn vestl.
- hémochromatose** ◇ **haemochromatosis** ◇ **hemokromatoz g.** Anaerz o c'hoarvezout eus un ensiladur livegennoù houarnin (hemofuksin, hemosiderin) en holl wiadoù ar bevedeg, er c'hroc'hen (*melanoderma*, Gl. *mélano dermie*) hag en avu dreist holl, kevret gant skleroz ar parenkimoù; div furn a ziforc'her : 1) an *h. kentael* (Gl. *h. primitive*, Sz. *idiopathic h.*), hêrezhel, treuzkaet er mod aotozomek enkilek, e dianlen un dargenad er c'henenn HFE loet war vrec'h verr ar c'hromozom 6, naouus dre girroz an avu, melanoderma, erzerc'hadoù liesflugezel hag enborc'hadel, un diabet c'hwek (alese an anvad all anezhañ : *diabet staenek*, Gl. *diabète bronzé*); 2) an *h. eilvedel, h. ezdeuat*, pe *hemosideroz* (Gl. *hémosidérose*), e dianlen treuzskuilhadoù niverus, kirroziou, negeziou bouedel (pellagra), amwadoù 'zo (sl. *cirrhose bronzée, diabète bronzé, sidérose hépatique*).
- hémocompatibilité** ◇ **haemocompatibility** ◇ **bevgempadusted b. wadel, gwadkempadusted b.** Perzh ur vevzafarenn da vont e diastok ar gwad hep dec'han gweredoù noazus (sl. *biomatériau, compatibilité sanguine*).
- hémococoncentration** ◇ **haemoconcentration** ◇ **1 dourwadisvec'h g. 2 dourwadisvec'hiañ** 1 Digresk feur an dour er gwad, naouus dre gresk e dolzder ec'honel, e c'hludegezh, ar bec'h ennañ eus ar protid hag eus an elfennoù luniek, ezreolder hemañ stadet en ezwad, en azoniad an dourisvec'h ezkelligel ha, gwechoù 'zo, er borrdre. 2 Devoudañ an dourwadisvec'h (sl. *déshydratation extracellulaire, exhémie, hémodilution*).
- hémocrinie** ◇ **haemocrinia** ◇ **engwadvorc'hañ** Tremenn er gwad eus dedaolad ar gwagrennoù enborc'hañ.
- hémoculture** ◇ **haemoculture** ◇ **gwadtiñvañ** Hadennañ ur metoù tiñvañ gant ur c'hementad bihan gwad erlamet dre ezwanañ.
- hémocytopenie** ◇ **blood cytopenia** ◇ **olkellig g. gwad, gwadolkellig g.** Isniver hollel pe darnel kelligoù (hemati, leukokit, pladanoù) er gwad amredat.
- hémodétournement, diversion circulatoire** ◇ **arterial steal** ◇ **stunañ pe stunad g. amredel, stunañ pe stunad talmerel** Distreiñ treug an amred talmerel diouzh un triad bonan dre araez an amred kengostezel war-du un triad iswazhiedet (e dianlen un anaf talmerel isvullus pe stevius), hevelep distreugañ o tevoudañ iswazhiedadur an triad bonan (sl. *crossé aortique : syndrome de la ~, sous-clavière voleuse : syndrome de la ~*).

hémodiafiltration ◇ **haemodiafiltration** ◇ **hemodiafiltrañ** Kalvezder karzhañ ezlounezhel o kevredañ en hevelep dalc'h prederiañ an hemodializiñ hag an ultrafiltrañ (sl. *hemodialyse, hémofiltration*).

hémodiagnostic, hémo-agglutination ◇ **haemodiagnosis** ◇ **gwaddeznaouiñ, gwaddeznaou g., gwaddazgludañ** Hentenn, deveret diouzh gwadveizprouad Widal, "o kevaraezañ deznaouiñ, ouzh gwele ar gouziviad, ar poreoù ganto un dazgludañ spesadel" (Brumpt) : tifoid, tifuz eksantematek, brukelloz, flus bazhellel, h.a. ; meskañ a reer un dakenn eus livrizhad an hadenn gousellet gant un dakennig eus gwad ar c'hlañvour ha, dindan 4 min, e teu heverzh an dazgludañ.

hémodialyse ◇ **haemodialysis** ◇ **hemodializiñ, hemodializ g.** Araezad karzhañ ezlounezhel dre fuerezh a-dreuz d'ur gennenn handreuz (lounezh kalvezadel) (sl. *diafiltration, dialyse, épuration extrarénale, hémodiafiltration, hémofiltration, ultrafiltration*).

hémodilution ◇ **haemodilution** ◇ **1 dourwadusvec'h g. 2 dourwadusvec'hiañ** 1 Kresk feur an dour er gwad, naouus dre zigresk e dolzder ec'honel, e c'hludegezh, ar bec'h ennañ eus ar protid hag eus an elfennoù luniek, ezreolder o c'hoarvezout e dianlen strummad al liñvennoù entremezel etrezek ar gwad, da skouer evit kevassav an ec'honad anezhañ da heul ur gwadliñv bras. 2 Devoudañ an dourwadusvec'h (sl. *hémoconcentration*).

hémodynamique ◇ **1 haemodynamic 2 hemodynamics** ◇ **1 gwadloc'honiell aa. 2 gwadloc'honiezh b.** 1 A-zave da amveziadoù loc'honiell amred ar gwad : gwask, kas, herr an diver, gwazhiedloc'hañ, harzded a 'r gwazhied, h.a. 2 Studi ar savelennoù eus monedigezh fizikel ar gwad e-barzh ar gwazhied.

hémodynamomètre ◇ **haemodynamometer** ◇ **hemodinamometr g. -où** Ardivink amkanet da vuzuliañ gwask ar gwad e diabarzh ar gwazhied.

hémofiltration ◇ **haemofiltration** ◇ **hemofiltrañ** Araezad karzhañ ezlounezhel ma vez dispartiet an disveveladoù pistriek eus ar gwad dre ultrafiltrañ dindan wask uhel a-dreuz d'ur gennenn gourhedreuz, en araez enta da ezvevennañ an danvezennoù a dolz mol uhel, disoc'h nad eo ket an hemodializiñ evit e ziraez.

hémooglobine, Hb ◇ **haemoglobin, Hb** ◇ **hemoglobin g., Hb** Livegenn analadel bezant en hemati hag o reiñ dezho o livrezh ruz, anezhi un holoprotein a dolz mol 68 000, dezouger oksigen d'ar gwiadou, a zelun bloc'hel ($(C_{738}H_{1166}FeN_{203}O_{208}S_2)^4$), ennañ ur stroll prostetek, an hem pe ferroprotoporfirin IX, hag ur protein, ar globulin, ouzh e ober daou zigorvell polipeptidek α ha β , amparet a-getep gant 141 ha 146 amindrenkenn ha kediet gant pep molekul hem; e gwad an den e sav feur an hemoglobin etre 8,1 ha 11,2 mmol/l gant ar gourev, etre 7,4 ha 9,9 mmol/l gant ar venev; ennañ ez eus etre 2,5 ha 3 g houarn, eleze ar 65 % eus houarn ar bevedeg; meur a seurtad hemoglobin a zeskriver : an HbA_1 hag HbA_2 , a-getep 98 % ha 2 %, furmoù bonan an oadour, an HbF , furm reol ar grouell, ar furmoù HbC , HbE , HbS , h.a. o vezañ kleñvedel.

hémooglobine glycosylée ou glyquée ◇ **glycosylate haemoglobin** ◇ **hemoglobin glikosilet pe gliket** Hemoglobin A, lenet gorrek ha pazennadek glukoz gantañ e-kerz e hoali; un argerzh reol, diastal hag aneitroüs; herrekoc'h e vez al lenadur gant an diabet ha, dre zevzentañ an Hb gliket, e c'haller reoliñ ar mezegadur.

hémooglobine instable ◇ **unstable haemoglobin** ◇ **hemoglobin distabil** Hemoglobin, gantañ un ezreolder luniadel, o vont d'un dierc'had (korfoù Heinz) e diabarzh an hemati; erzerc'hañ a ra an hemoglobinoz diwar Hb distabil dre un amwad loezadel hag a-wechoù dre an droazhhehmooglobinegezh.

hémooglobine : teneur corpusculaire ou globulaire moyenne en ~ ◇ **mean corpuscular haemoglobin** ◇ **hemoglobin ruzkelligel keitat** Kementad hemoglobin endalc'h het gant un hematienn, ent reol etre 27 ha 32 pg (etre 1,7 ha 2 fmol).

hémoglobinémie ◇ **haemoglobinaemia** ◇ **plasmahemoglobinegezh b.** Bezañs hemoglobin e plasma ar gwad, reol dindan 5 mg / 100 mL, uheloc'h ent ezreol da heul loezadur an hemati.

hémoglobinométrie ◇ **haemoglobinometry** ◇ **hemoglobinentañ** Muzuliañ feur an hemoglobin amredat dre araez an hemoglobinomestr.

hémoglobinobilie ◇ **haemoglobinocholia** ◇ **bestlhemoglobinegezh b.** Bezañs hemoglobin er vestl, kleñvedel bepred.

hémoglobinopathie ◇ **haemoglobinopathy** ◇ **hemoglobinad g.** Anvad genadel ezreolderioù an hemoglobin, daou spesad anezho : 1) an *h. kementadel* (Gl. *h. quantitatives*), diwar amparadur ar molekul hemoglobin gant digorvelloù polipeptidek reol dasparzh etreol, a-geñver gant ur si e gennenn reoler an hemoglobin (sl. *thalassémie*); 2) an *h. doare-adel* (Gl. *h. qualitatives*) pe *hemoglobinoziou* (Gl. *hemoglobinoses*), diwar un ezreolder ebarzh luniad unan eus digorvelloù polipeptidek an hemoglobin (sl. *drépanocytose*).

hémooglobinosynthèse, hémooglobinogenèse ◇ **haemoglobinogenesis** ◇ **hemoglobinbarañ** Enozañ an hemoglobin.

hémoglobinurie ◇ **haemoglobinuria** ◇ **troazhhehmooglobinegezh b.** Bezañs, ezreol bepred, hemoglobin en troazh, hemañ o vont warnañ neuze ul livrezh azgell.

hémoigramme, hématogramme ◇ **complete blood count** ◇ **gwadrestrad g.** 1 Disoc'h eus studi kementadel ha doareadel elfennoù luniek ar gwad (niver an hemati hag al leukokit dre mm³, feur an hemoglobin ha gwennrestrad) (sl. *formule leucocytaire*). 2 Krommenn o terc'hennañ an argemmadur eus ec'honad an hemati e-kerz ur c'hleñved.

hémothydarthrose ◇ **bloody hydarthrosis** ◇ **arzdourwadad g.** Fennad levrus ha gwadek war un dro e kavenn ur c'henvell.

hémolysé ◇ **haemolysis** ◇ **gwadloezañ, gwadloez g.** Distruj an hemati; ar *gwadloezañ bonan* a c'hoarvez er mel eskern goude un hoali e-tro 120 deiz; ar *gwadloezañ kleñvedel* a lavarer *enien* (Gl. *h. corpus-culaire*) pa vez dec'hant gant ur miluniad

a 'n hemati, *ezien* (Gl. *h. extra-corporculaire*) pa 'z eo an arbenn anezhañ treloc'hel (trapigosod), pistriell pe hangaeel (sl. *anémie hémolytique, ictère hémolytique*); ar *gwadloezañ kalvezadel* a wezhier da ren imboure'hiou amglinikel.

hémolysine ◇ **haemolysin** ◇ **hemolizin** g. Danvezenn en araez da zec'han ar gwadloezañ, emañ bezant e toksinoù garvevel 'zo, er binimoù, pe o tiwanañ er gwadvez e rezh antikorfoù dindan wered antigenoù (sl. *sensibilisatrice*).

hémolytique ◇ **haemolytic** ◇ **1 gwadloezus** aa. **2 gwadloezadel** aa. 1 O tec'han gwadloezañ. 2 A-zave d'ar gwadloezañ.

hémomédiastin ◇ **haemomediastinum** ◇ **puoullkreizwadad** g. Fennad gwad e-barzh gwiad kellaouek ar poullkreiz.

hémopathie ◇ **haemopathy** ◇ **gwadnaoued** g. Anvad rumm anaезioù naous dre un darallad eus ar gwad, pe leiadel (amwadoù), pe uswel (elruz), pe hanweel (leukemiezh).

hémoperfusion ◇ **haemoperfusion** ◇ **edsilañ gwad, gwadedsilañ** Araezad karzhañ ezlounezhel evit lemel eus ar gwad ur bistrienn ezdeuat : dre araez un amredad ezkorfel a ra d'ar gwad tremen dre un ardivink silañ (karitell glaou blivaet) oc'h amsunañ an danvezenn bistriek.

hémopéricarde ◇ **haemopericardium** ◇ **amgalonnenwadad** g. Fennad gwad e-barzh an amgalonenn.

hémopéritoine ◇ **haemoperitoneum** ◇ **ampelennwadad** g., **torwadad** g. Fennad gwad e-barzh an ampelenn.

hémophile ◇ **hemophilic** ◇ **1 hemofilek** aa. **2 hemofileg** g. -eion 1 Gant an hemofiliezh. 2 Gouziviad hemofilek.

hémophilie ◇ **haemophilia** ◇ **hemofiliezh** b. Anaez hêrezhel enkilek reveret, treuzkaset dre ar maouezed hag o tizhout ar wazed hepken, oc'h erzerc'hañ ken abred hag ar vabaniezh dre ar raktued d'ar gwadliñvoù grevus, emdarzh pe gwezhiet, anharzadus hag adfeilhus, naous dre un dale bras a 'r c'haouledih diwar ezvezañs ar parennoù antihemofilek A ha B (alese ar c'hemm etre an hemofiliezh A hag an hemofiliezh B, pe kleñved Christmas, dibaotoc'h); reol e vez holl elfennoù all ar gwad koulz hag endotelienn ar gwazhiet; dre an erwezhiadoù hangaeel e tiforc'her an *h. A-* ha *B-* (ezvezañs ar parennoù A ha B) hag an *h. A+* ha *B+* (ma vezont bezant, met diwered); hep prederiadur e vez an hemofiliezh dilañsus hag alies marvus; abaoe 1970, ez eo bet treuzfurmet an erdeb bennozh da liaoù o pourchas d'ar gwad ar parennoù ezvezant.

hémophilique : **états** ~s ◇ **haemophilic states** ◇ **stadoù** l. (b.) **hemofilek** Stadoù kleñvedel heñvel ouzh an hemofiliezh dre o arouezioù klinikel ha bevoniel, blinoc'h alies evelkent, en ezvezañs a ziagetoù hêrezhel ha familhel, o tarvezout hep arbenn stadet pe e-kerz poreadoù pe pistriadoù, kevredet alies ouzh ar purpura.

hémophtalmie ◇ **haemophthalmia** ◇ **lagadwadad** g. Fennad gwad e-barzh boull al lagad.

hémopneumopéricarde ◇ **haemopneumopericardium** ◇ **amgalonennaehzwadad** g. Hogennad aezhenn ha gwad e-barzh kavenn an amgalonenn.

hémopneumothorax ◇ **haemopneumothorax** ◇ **bruskaehzwadad** g. Hogennad aezhenn ha gwad e-barzh kavenn ar grezenn.

hémopompe ◇ **haemopump** ◇ **gwadpomp** g. Trevnad amredeilañ padennek, anezhañ ur pomp diaevaz hag ur c'hateter dodet dre hent talmerel a-gilred e-barzh ar c'hofig kleiz, o sunañ gwad eus ar gavenn-mañ evit e ensinklañ en aortenn a-ziskenn.

hémoprotozoose, protozoose sanguine ◇ **protozoan blood infection** ◇ **gwadprotozooz** g. Anvad rumm ar c'hleñvedoù diwar ar vezañs er gwad eus arvevaded gougevret ouzh skourrad ar protozoed (paludegezh, tripanozomiaz, leichmaniaz, piroplasmoz, anaplasmoz).

hémoptoïque ◇ **haemoptoic** ◇ **gwadskopadel** aa. A-zave d'ar skopañ gwad.

hémoptysie ◇ **haemoptysis** ◇ **skopañ gwad, skopad** g. **gwad, gwadskopad** g., **skrouediañ** g. **gwad, skrouediad** g. **gwad** Disteurel dre ar genoù ur c'hementad bras pe vrasoc'h gwad o tont eus ar forzhioù analañ, diwar ur gwadliñvañ er benvegad analañ pe en un organ kefin aet kehent gant skoultrig ar bronkez.

hémorragie ◇ **haemorrhage** ◇ **gwadliñvañ, gwadliñv** g., **gwadliñvad** g. Ezfennañ gwad a gementad bras pe vrasoc'h eus ur wazhiedenn.

hémorragie de la délivrance ◇ **postpartum haemorrhage** ◇ **gwadliñvañ ar gweleskar** Gwadliñvad ouzhpenn 500 mL diwar gorreenn enlanañ an dorzhienn ouzh ar grozh o tarvezout en 24 eurvezh goude ar gwilioud, peurliesañ e dianlen un azgannad torzhienn pe un anniñv a 'r grozh.

hémorragie méningée ◇ **subarachnoid haemorrhage** ◇ **gwadliñvañ pilhon, gwadliñvañ endan-gevnidek** Diwad da heul freg ur wazhiedenn er gavenn endan-gevnidek e dianlen un daraez pe ur gammneuziad (angiom, darvoll).

hémorragie occulte ◇ **occult haemorrhage** ◇ **gwadliñvañ amguzh** Diwad e rezh kementadoù bihan e-barzh ar stomok, ar pervez pe ar benvegad analañ, na vez stadet nemet dre un imboure'h kimiek war an oulennoù pe ar skrouediadoù.

hémorragine ◇ **haemorrhagin** ◇ **hemorragin** g. Danvezenn bezant e binim ar viperideged, o tevoudañ ur gwadliñv ha, dre draoliañ ar gwadoù, ur blakenn vreinged en dro d'ar poent enkoriñ.

hémorragiose constitutionnelle anhémo-pathique, hémophiloïde ◇ **haemophiloid** ◇ **hemofiloid** g., **hemorragioz** g. **genezhel** Anaez o tizhout ar baotred yaouank dreist holl, naous dre un tued da wadliñvañ, hep ezreolder stadet er gwad nag er c'horrwazhiet.

hémorragipare ◇ **haemorrhagiparus** ◇ **gwadliñveiat** aa. Oc'h ober gwadlivañ.

hémorragique ◇ **haemorrhagic** ◇ **1 gwadliñvek** aa. **2 gwadliñvus** aa. **3 gwadliñvel** aa. 1 Gant ur gwadliñv, sk. : *ur gouziviad gwadliñvek*. 2 O wadliñvañ, tuet da wadliñvañ, sk. : *ur yoc'henn wadliñvus* 3 a-zave d'ar gwadliñvañ, sk. : *un azoniad gwadliñvel*.

hémorr(h)éologie ◇ **haemorrhoeology** ◇ **gwadveroniezh** b. Studi eus berusted ha gludegezh ar gwad hag eus mezellded an elfennoù luniek anezhañ e-barzh ar gwazhied.

hémorroïdal ◇ **haemorrhoidal** ◇ **1 gwazrudezek** aa. **2 gwazrudezel** aa. 1 Gant ar wazrudez. 2 A-zave d'ar wazrudez, sk. : *an naouez wazrudezel* (Gl. *le flux hémorroïdal*).

hémorroïde ◇ **haemorrhoid** ◇ **gwazrudez** b. Bolc'hadenn deuc'hellek eus ar gwazhiennoù fraezh-youlc'h, a lavarer *diavaez* pe *diabarzh* pa vez lec'hiet a-getep a-is pe a-us da gigenn gelc'hstrishaer ar fraezh.

hémorroïdectomie ◇ **haemorrhoidectomy** ◇ **gwazrudezevenañ** Dilemel surjanel ar wazrudez.

hémossalémèse, pituite hémorragique ◇ **haemosialhaemesis** ◇ **gwadhalc'hweliñ, kraostad** g. **gwadek** Distaol dre ar genoù eus ur meskad halv ha gwad o tont eus an treizher.

hémosidérine, pigment ocre ◇ **haemosiderin** ◇ **hemosiderin, livegenn** b. **okr** Livegenn dourandileizh, enni hidrokسيدenn ferrek, furm gadav an houarn er bevedeg (etre 800 ha 1 000 mg, eleze etre 25 ha 30 % eus an houarn hollel), kedrann reol ar reizhiad retikuloendotelel, bezant e kleizenn an annonnoù gwadliñvel ha paot e kleñvedoù 'zo : kalonnaouedoù dedroat, poreadoù henek, hemokromatoz dreist holl ma vez intret ar flugez, an avu pergen, an avu pergen, gant al livegenn okr.

hémosidérose, hypersidérose ◇ **haemosiderosis** ◇ **hemosideroz** g., **usvec'h** g. **hemosiderin** Reñver kleñvedel hemosiderin en organoù, en avu pergen; *hemosideroz* n'eo ket kenster da *hemokromatoz* (sl. *hémochromatose*).

Hémospories ◇ **Haemsporidia** ◇ **Hemosporidi** s. Kerentiad Sporozoe gougevret ouzh urzhad ar *Coccidiae*, arvevaded o trigañ e-barzh hemati ar *Mellikeined*; an *H* oc'h arvevañ ouzh an den zo eus ar genad *Plasmodium* (hematozoe ar baludegezh).

hémosporiose ◇ **haemsporidiasis** ◇ **hemosporidiaz** g. Anvad rumm evit an erzerc'hadou kleñvedel devoudet gant an hematozoe.

hémostase, hémostasie ◇ **haemostasis** ◇ **gwadkaeañ, gwadkae** g. 1 Astaliñ ur gwadliñv, emdarzh pe gwezhiet. 2 Trevnad kemplezh an anadennoù bevedel a ra d'an ode wazhiedel klozañ ha d'ar gwadliñvañ paouez; daou lankad a zeskriver : ar *gwadkaeañ kentael*, ma c'hoarvez ar gwazhiedstrishaat, dazadur ar pladanoù ha furmidigezh ganto an trombuz gwenn; ar *gwadkaeañ eilvedel*, anezhañ dazadur an hemati (kaulediñ) dre wered enzimoù plasmatek ha gwiad, o tisoc'h gant furmidigezh an trombuz ruz (sl. *adhésion des plaquettes, agrégation des plaquettes, cicatri-sation, clou hémostatique, coagulation*).

hémostatique ◇ **haemostatic** ◇ **1 gwadkaeañ, gwadkaeiis** aa., **gwadkaeer** aa. **2 gwadkaeer** g. **-ioù 3 gwadkae-adel** aa. 1 En araez da wadkaeañ. 2 Araez gwadkaeañ (kimiek, treloc'hel), sk. *gevel wadkaeañ* (Gl. *pince hémostatique*). 3 A-zave d'ar gwadkaeañ.

hémothérapie, hémothérapie ◇ **haemotherapy** ◇ **gwadkurañ** Arverañ yac'hadel ar gwad.

hémothorax ◇ **hæmothorax** ◇ **bruskwadad** g. Fennad gwad pur e kavenn ar grezenn, e dianlen un daraez peurliesañ.

hémotype ◇ **haemotype** ◇ **gwadrizh** g. Teskad an doareennoù hêrezhel eus gwad un hinienn, an antigenoù eritrokiteel anezhañ pergen.

NOTENN : Kemm a lakaer etre ar *gwadrizh* hag ar *rizh gwad* (Gl. *groupe sanguin, Sz. blood type*) nad eo nemet un elfenn anezhañ.

hémotypologie ◇ **haemotypology** ◇ **gwadrizhouriezh** b. Studi doareennoù hêrezhel ar gwad (sl. *hématologie géographique*).

hémovigilance ◇ **haemovigilance** ◇ **gwadkost** g., **gwadkosterezh** g. Obererezh un aozadur kefridiel o notennañ, marilhañ hag andalañ miweredoù an aozadoù gwadel danvezet er yac'hadurezh (sl. *matérovigilance, pharma-covigilance*).

hémozoïne ◇ **haemozoin** ◇ **hemozoin** g., **livegenn baludek** Livegenn du deveret diouzh an hemoglobin, hematin ha protein ouzh he ober, bezant e kitoplasm arvevaded eneritrokiteel ar baludegezh.

hém-, hémato-

- *anémie hémolytique* amwad loezadel • *anémie hémolytique immunologique* amwad hangaeloezadel • *arthropodes hémato-phages* artropod gwadzat • *assurer l'hémo-stase* gwadkaeañ • *céphalhématome* gwatoñv ar volzenn, bolzpennwatoñv • *clou hémostatique* broch gwadkae, broch gwenn • *hématome organisé* gwatoñv trevnet • *hématome sous-périostique* gwatoñv endan-amaskornenn • *hémorragie localisée* gwadliñv lec'hiek • *investigations hémodynamiques* imbourc'hiou gwadloc'honiel • *streptocoque hémolytique* strepokok gwadloezus • *troubles hématologiques* strafuilhoù gwadel • *tumeur maligne propagée par voie hémotogène* yoc'henn yud treledet dre hent ar gwad • *vésicule remplie d'un liquide séreux ou hémorragique* c'hwiezgenn leun gant ul liñvenn levrus pe wadek.

Henkin : syndrome de ~ ◇ **Henkin's syndrome** ◇ **azoniad Henkin** Gwariadur ar c'hwesha hag an tañva a orin ansavelet (negez ar zink ?) o kevredañ istañva ha midañva, isc'hwesha ha mic'hwesha.

Hennequin : gouttière de ~ ◇ **Hennequin's splint** ◇ **savneel** b. **Hennequin** 1 Steudell disloc'h metal ouzh torr an askorn morzhed. 2 Steudell blast evit an ezel krec'h, enni un toull evit ar meud.

Henry : réaction de ~, séroflocculation palustre ◇ **malarial seroflocculation** ◇ **dazgwered** g. **Henry, gwadveizvalzenniñ paludek** Malzenniñ ul livrizhenn melanin pa azdoder outi gwadveiz ur paludeg; merk ar pare e ve ezvezañs an dazgwered.

Hepadnaviridae, Hepadnaviridés ◇ **Hepadnaviridae** ◇ **Hepadnaviridae, Hepadnavirideged** l. (g.) Kerentiad viruzoù gant DNA undigorvell, en o zouez viruz B an avufo denel.

héparine ◇ **heparin** ◇ **heparin** g. Enepkaoleder naturel, eus stroll ar mukopolisakarideier, bezant e-barzh holl wiadoù ar bevedeg, en avu hag er c'higennoù pergen; e zoughenniñ a reer eus skevent an oc'hen hag eus glaourgenn pervez ar moc'h hag e ziounit dre hent dangroc'henele pe engwazhiennel evit ergurañ pe gurañ an tromboziou; ezniñvañ a ra parennoù ar c'haouledañ dre hanterezh ur protein, an trombindolc'her III : enebñ ouzh furmidigezh an tromboplastin, an trombin hag ar fibrin, heudañ ar parennoù XIII ha X ha herzel ouzh glenañ ha dazañ ar pladanoù (sl. *anti-Xa*, *anticoagulant*, *antithrombine*).

héparinisation, héparinothérapie ◇ **heparinization, heparinotherapy** ◇ **heparinañ, heparinadur** g., **heparingurañ** Ar-verañ an heparin er yac'hadurezh.

Heparnavirus ◇ **Heparnavirus** ◇ **Heparnavirus** Genad virus gant RNA eus kerentiad ar *Picornaviridae* ma renker viruz an avufo A.

hépatalgie ◇ **hepatalgia** ◇ **avuost** b. Laur en avu, sk. : *avuost strivañ* (Gl. *hépatalgie d'effort*), laur e rannbarzh an avu o tarvezout da geñver ar strivoù gant ar galongleñvion vintrek pe skeventek.

hépatectomie ◇ **hepatectomy** ◇ **avuezvenañ** Dilemel surjaniel an avu a-bezh pe a-zarn (sl. *hépatolobectomie, sectorectomie, segmentectomie*).

hépaticoduodénostomie ◇ **hepaticoduodenostomy** ◇ **dasforzhañ sanavudaouzegenn** Skarvañ san voutin an avu ouzh an daouzegenn.

hépaticostomie ◇ **hepaticostomy** ◇ **sanavuezforzhañ** Skarvañ san voutin an avu ouzh speur ar c'hof.

hépaticotomie ◇ **hepaticotomy** ◇ **sanavuenbenañ** Flañchañ san voutin an avu, peurliesañ evit lemel grouan bestlel.

hépatique ◇ **hepatic** ◇ **~avu, avuel** A-zave d'an avu.

hépatisation ◇ **hepatization** ◇ **avuegañ** A-zivout ur gwiad, kemmañ neuz ha mont fetis ha gell-ruz evel an avu, sk. : *avuegañ ar skevent* (Gl. *hépatisation pulmonaire*, termen savet gant Laennec e 1819 pa studie ar skeventfo).

hépatite ◇ **hepatitis** ◇ **avufo** g. Anvad rumm tanijennoù an avu.

hépatite A, HA ◇ **hepatitis A, HA** ◇ **avufo A, HA** Tanijenn avu diwar un enterovirus gant RNA, virus an avufo A (HAV), eus ar genad *Heparnavirus*, oc'h enteñ er bevedeg dre hent koazhadel; anaez skignek, darreuziadek a-wechoù; goude ur gounervezh a 18 da 40 devezh, e teu erzerc'h e rezh un iker hag un derzhienn leiek ha parañ a-benn 15 devezh; stadañ a reer furmoù yud gant isteñv goulemm an avu hag, en eheb, furmoù diazon (en 80 % eus ar boblañs e noter bezañs an antikorf antiHA a rizh IgG); erguret e vez dre ziounit gammaglobulinoù hag, abaoe 1992, dre ar vaksinañ.

hépatite alcoolique ◇ **alcoholic hepatitis** ◇ **avufo alkoolle** Anafoù gwiad el an avu diwar an alkoolegezh henek (sl. *foie alcoolique*).

hépatite auto-immune ◇ **autoimmune hepatitis** ◇ **avufo unanhangaeel** Anvad lakaet war avufoioù henek dianav o arbenn, paotoc'h gant ar beneved e deroù hag e dibenn o hoal ganadel, kevret gant erzerc'hadoù desellet evel unanhangaeel (kenvellel, kroc'henele, gwerblennele, lounezhele, enborc'hadel, gwadel) ha gant erwezhoù gwadvezel (gwadusvec'h gammaglobulinoù IgG, h.a.); e stern an anaez-mañ e renker furmoù avufo grevus evel ar *c'hirroze lipidel* pe ar *c'hirroze bestlel kentael* (sl. *cirrhose biliaire primitive*).

hépatite B, HB ◇ **hepatitis B, HB** ◇ **avufo B, HB** Anaez diwar ur virus spesadel gant DNA, virus an avufo B (HBV), eus kerentiad an *Hepadnaviridae*, oc'h enteñ er bevedeg dre an arver eus nadozioù ha strinkelloù gouziblel, an ensinkladur eus gwad pe gwadveiz denel louezet pe, dreist holl, dre an diastok glaourgennel ouzh halv pe borc'hadoù ganadel; reuziañ a ra er "strolleñoù uhelriskl" : koskor an imboure'hvaou hag ar gwazrannoù dializ, kaezhiaded, heñvelreviadeg; heñvel eo an azonoù ouzh re an avufo A, nemet ez eo hiroc'h ar gounervezh (a 60 da 150 devezh), paotoc'h ar furmoù anikterek ha diazon; diazezet eo an deznau bevoniel war vezañs an antigen HBs kevredet gant an antikorf antiHBc a rizh IgM; e 90 % eus an degouezhoù e pare an HB dindan 6 da 8 sizhunvezh; en un 10 % all e talc'h ar virus da drigañ er bevedeg (dougion hadennoù) : yac'h e van 30 % eus ar re-mañ ha gant 40 % (furmoù anikterek, hangaeastaleion, gouved dreist holl) e stader azonoù un *avufo henek trebadek* (Gl. *hépatite chronique persistante*); erfin, gant an 30 % all, e tedro gorrek, war un 30 vloavezh, un *avufo henek gwezhius* (Gl. *hépatite chronique active*), en ervez da zifourkañ en ur c'hirroze ha, 10 bloavezh goude, en un hepatokarkinom; ergemennet e vez ar vaksinadur ergurañ d'an hiniennoù ardzhekañ.

hépatite C, HC ◇ **hepatitis C, HC** ◇ **avufo C, HC** Avufo dianskuilhadel diwar virus an avufo C (HCV), virus gant RNA eus kerentiad ar *Flaviviridae* hennadet e 1989, kinniget evitañ an anvadoù *Hepacivirus* pe *Hepacivirus*; anaez oc'h ober an niver brasañ eus ar furmoù skritellet diagent *avufoioù nag A-na B*; anikterek e chom an 90 % eus an degouezhoù, henek ez a ar 50 % ha dedreñ a ra an 10 % d'ar c'hirroze.

hépatite cholestatique ◇ **cholestatic hepatitis** ◇ **avufo bestlanredel** Anaez dibaot o tizhout an oadour, ar merc'hed dreist holl, naouus, *ent klinikel* dre un deroù gant terzhienn, laur er c'hougestadenn dehou, c'hweladoù, debron garv ha treutadur bras, *ent vevoniel* dre wadusvec'h bilirubin, lipidoù, fosfataz alkaliek ha transaminaz glutamek-piruvek hag un amzer Quick hiraet; gorrek e vez ar parañ; kevarguziñ a reer ur giriegezh viruzel.

hépatite chronique ◇ **chronic hepatitis** ◇ **avufo henek** Poread an avu manguñ alies en e zeroù, o tedreñ gorrek dre resmiadoù terzhienn hag iker etrezek ur c'hirroze gant usvent an avu hag ar felc'h, krennet a-wechoù gant ar marv dre wadliñvoù diwar uswask porzhel, koma avuien pe dic'henezhadur yud; naouus ent neuziadurel dre anafoù kantet en deroù er gremoù etreflipezennele (ensiladur plasmolimfokitel), stad anvet *avufo henek trebadek* (Gl. *h. c. persistante*); en un eil stad, dre aloubidigezh

ar flipezennoù ha gwazhadur kentañ kelligoù an avu, an *avufo henek gwezhius* (Gl. *h. c. active*) eo; un trede stad, ar c'hrevusañ, an *avufo henek kezzius* (Gl. *h. c. aggressive*), eo hini marvennadur ar c'helligoù avu; en orin an avufoioù henek emañ an avufoioù C dreist holl, B ha D ivez, nepred A, an avufoioù liaien hag an avufoioù unanhangaeel (sl. *cirrhose post-hépatitique*).

hépatite D, HD ◇ **hepatitis D, delta agent hepatitis, HD** ◇ **avufo D, HD** Avufo diwar ar gwezher delta pe viruz an avufo D, viruz amwerc'h a rank bezañs antígen gorre viruz an avufo B evit nerñ: disoc'h ur c'henboreañ pe un dreistporeañ eo enta an avufo D.

hépatite E, HE ◇ **hepatitis E, HE** ◇ **avufo E, HE** Avufo darreuziadek treuzkaset dre an oulennoù, hep dedro henek, stadet en Azia hag en Afrika dreist holl, devoudet gant ur *Calcivirus*, viruz bihan gant RNA bet goubarret e 1989, a vez dinoet dre an dazgwered hangaeenzimatek (ELISA).

hépatite F ◇ **hepatitis F** ◇ **avufo F** Seurtad avufo a zo c'hoazh kevarguzet e revoud.

hépatite familiale juvénile avec dégénérescence du corps strié, maladie de Wilson ◇ **Wilson's disease** ◇ **avufo familhel ar yaouerion gant dic'henezhadur ar rizennek, kleñved Wilson** Kleñved hérezhel a stader gant ar vugale hag an dud yaouank, o teraouiñ a-wechoù dre un ikter leiek, naouus dre ur reuter dasstrizhek hag ur c'hrenerezh, ur walenn staenek war wrimenn ar gornsaes (trogornsaenn Kayser-Fleischer), strafuilhoù bred (tuzumadur kefredel, gourboz) hep envedi; treuzfurmet eo bet an dedroadur, marvus ent emdarzh, gant ar prederiañ dre ar c'helaterioù (D-penikillamin); ent neuziadurel ez eo naouus kleñved Wilson dre gevredet un avufo nozelek ha dic'henezhadur ar rizennek (sl. *chélateur, dégénérescence hépatolenticulaire*).

hépatite fulminante ◇ **fulminant hepatitis** ◇ **avufo rurek** Avufo o teraouiñ trumm, naouus dre un diflosk eus arc'hwelioù an avu hag ur gwazhadur empennfoel o tisc'h er c'homa, furm dibaot avufo viruzel (HB dreist holl) o tizhout an oadour yaouank, bet deskriet a du 'rall gant Rokitansky ha Frerichs e 1842 dindan an anvad *isteñv melen lemm an avu* (Al. *akute gelbe Leberatrophie*, Gl. *atrophie jaune aiguë du foie*), (sl. *ictère grave*).

hépatite non A-non B ◇ **non-A non-B hepatitis** ◇ **avufo nag A-na B** Termen lakaet en arver e 1975 evit aroueziñ an avufoioù viruzel diwar wezherioù anhennadet, bet hennadet abaoe: an *avufo C*, treuzkaset dre enkoradur, ar paotañ, en ervez da zedreñ etrezek an henegezh, an *avufo E*, darreuziadek, dezhañ ur mod treuzkas nes da hini an avufo A, dibaot e Kornogeuropa.

hépatite virale ou à virus ◇ **viral hepatitis** ◇ **avufo viruzel** Tanijenn an avu devoudet gant ur viruz, oc'h erzerc'hañ ent klasel dre un ikter; an daou seurtad dizoloet da gentañ (1964) e voe an *avufo A* (avufo darreuziadek), an hini paotañ (80 % an degouezhioù) hag an *avufo B* (avufo enkoradel); a-douez an avufoioù all, renket da gentañ dindan ar skritell "avufoioù nag A-na B", e voe digejet an *avufo C* hag an *avufo E* (1989); an *avufo D*, bet hennadet e 1977, zo disoc'h ar c'henboreañ pe an dreistporeañ gant ar viruz B hag ar gwezher delta; emañ viruzoù all, bihanoc'h o avugerc'h, e devoud avufoioù: ar viruz EB, eus kerentiad an *Herpesviridae*, ar c'hitomegaloviruz, h.a.; anv a reer ivez eus furmoù all, a skriteller *avufoioù nag A-B-C-D-E*, reoù anezho a anver *avufoioù F, G...*, ivez ur stroll nevez avufoioù diwar *viruzoù GBV* eus kerentiad ar *Flaviviridae*.

hépatoblastome ◇ **hepatoblastoma** ◇ **hepatoblastom g.** Yoc'henn yud an avu evodet antrevnek diouzh kelligoù rizhellel, o tarvezout gant ar vagadell, o tindreñ herrus d'ar marv.

hépatocèle ◇ **hepatocèle** ◇ **avuogad g.** Avelenn an avu.

hépatocellulaire ◇ **hepatocellular** ◇ **avugelligel aa.** A-zave da gelligoù parenkim an avu.

hépatocholangio-entérostomie ◇ **hepatocholangioenterostomy** ◇ **avuestladforzhañ er pervez** Skarvañ forzhioù bestl bras enavuel ouzh ar pervez, gwezh renet pa vez steviet ar san vestl ha san voutin an avu.

hépatocyte ◇ **hepatocyte** ◇ **avugellig b.** Kellig eus parenkim an avu o wezhiañ an arc'hwelioù ezvorc'hañ hag enborc'hañ anezhañ.

hépatogène ◇ **hepatogenous** ◇ **avuien aa.** O tont eus an avu.

hépatogramme ◇ **hepatogram** ◇ **1 avurestrad g. 2 avulunad g. 3 avudresenn b.** 1 Deluniad doareadel ha kementadel ar c'helligoù (a 'n ac'hadoù gwad pergen) dastumet dre ezwanañ an avu. 2 Skeudenn disoc'h eus an avuluniñ. 3 Kevregad disoc'h eus lerc'hwezañ ar poulz avuel.

hépatographie ◇ **hepatography** ◇ **avuluniñ** Skinluniñ an avu goude ensinklañ ennañ ur skindemerenn; an *avuluniñ izotopek pe gammaluniñ an avu* (Gl. *hépatographie isotopique*) a wezhier dre ensinklañ dre ar wazhienn ur skinizotop ec'hoder skinoù γ ha luc'hskudenniñ asteud e zehentadur dre araez ur c'hamera skingann.

hépatologie ◇ **hepatology** ◇ **avoueriezh b.** Studi korfadurel, bevedourel ha kleñvedourel an avu.

hépatomanométrie ◇ **hepatomanometry** ◇ **avuwaskventañ** Muzuliañ ar gwask e gwazhiennoù an avu ha dre se er reizhiad porzh.

hépatome ◇ **hepatoma** ◇ **hepatom g.** Yoc'henn evodet diouzh kelligoù parenkim an avu, *kuñv* (adenom unel kuñv Cathala) pe *yud* (epiteliom, hepatokarkinom, adenokarkinom an avu), alies eilvedel d'ur c'hirroze e dianlen un avufo B.

hépatomégalie ◇ **hepatomegalia** ◇ **1 usvent g. avu, avuusvent g.** Muiadur ec'honad an avu.

hépatomégalie polycorique ◇ **hepatomegalia of polycoria** ◇ **keuravuegezh b., usvent polikorek an avu** Anvad rumm ur stroll anaezioù ganedigal henek, familhel a-wechoù, anporeel, stadet er vabaniezh, naouus dre usvent bras an avu hep usvent ar felc'h, un dilerc'h kreskiñ, direizhoù kennevid ar glukid hag al lipid, hogennadoù bloc'hek druzennoù pe glikogen e-barzh an avu.

hépatopathie ◇ **hepatopathy** ◇ **avudad g., avunaoued g.** Anvad rumm anaezioù an avu.

hépatorrhaphie ◇ **hepatorrhaphy** ◇ **avuzlita** Krafaelañ div vriell ur gouli a 'n avu.

hépatosplénomégalie ◇ **hepatosplenomegaly** ◇ **usvent g. avu ha felc'h, avufelc'husvent g.** Muiadur ec'honad an avu hag ar felc'h.

hépatostomie ◇ **hepatostomy** ◇ **avuezforzhañ** Gwehenniñ an avu gant skarvañ e forzhioù ouzh ar speur, a wezhier pa vez steviet diremed ar san vestl ha san voutin an avu (sl. *cholangiostomie*).

hépatothérapie ◇ **hepatotherapy** ◇ **avugurañ** Arver yac'hadel an avu diounezet ent krai pe e rezh douhennadoù kemeret dre ar genoù pe sanket er c'higennoù.

hépatotoxémie ◇ **hepatotoxaemia** ◇ **gwadpistriegzh b. avuien** Hogennadur er gwad a bistriennoù o tont eus an avu.

hépatotoxicité ◇ **hepatotoxicity** ◇ **avubistriañ, avubistriusted** Galloud pe gwered distrujus ouzh kelligoù an avu.

hépatotoxine ◇ **hepatotoxin** ◇ **avuwazher g. -ioù, hepatotoksin g.** Antikorf gwazhus ouzh an avu, dinodet er gwadvez dindan geraez un antigen avuel.

hépatotrope ◇ **hepatotropic** ◇ **avugerc'h aa.** Gant ar perzh da lenañ ent hanbarek ouzh an avu, sk. : *virus avugerc'h*.

hepcidine ◇ **hepcidin** ◇ **hepkidin g.** Peptid avuien dezhañ perzhioù enepgarve, dasperzhiat en arouleviañ sugerezh pervezel an houarn dre e c'hevennañ pa vez gwadelhouarn; arbenn e ve d'an amwad foel.

héréditaire ◇ **hereditary** ◇ **hêrezhel aa., a-hêrezh** Treuzkaset dre ouennañ; enepster : *arzeuat* (Gl. *acquis*).

hérédité ◇ **heredity** ◇ **hêrelezh b.** Treuzkas dre ouennañ doarenoù erzerc'haet pe get; emañ an doarenoù hêrezhel a-zalc'h ouzh ar gen, loet er c'hromozomoù.

hérédité autosomique ◇ **autosomal heredity** ◇ **hêrelezh aotozomek** Treuzkas un doareenn a-zalc'h ouzh ur c'henenn loet en un aotozom (kromozom anrevel) (sl. *hérédité liée au sexe*).

hérédité collatérale, collatéralité ◇ **collateral inheritance** ◇ **hêrelezh b. kevelac'hadel** Bezañs gant un den eus doarenoù bezant ivez gant kevelac'hourion (tud dezho un diagentiad boutin gantañ) (sl. *maladie familiale*).

hérédité convergente ◇ **biparental inheritance** ◇ **hêrelezh a zaou berzh, hêrelezh daouberzh** Bezañs gant un den eus doarenoù treuzkaset war un dro gant an tad ha gant ar vamm.

hérédité croisée ◇ **crisscross inheritance** ◇ **hêrelezh a-eilrev** Treuzkas an doarenoù hêrezhel eus ar vamm d'he mab pe eus an tad d'e verc'h.

hérédité directe ◇ **hêrelezh a-genrev** Treuzkas eus an doarenoù hêrezhel eus ar vamm d'he merc'h pe eus an tad d'e vab.

hérédité dominante ◇ **dominant inheritance** ◇ **hêrelezh trec'hek** Treuzkas un doareenn drec'hek.

hérédité liée au sexe ◇ **sex-linked heredity** ◇ **hêrelezh revereet** Treuzkas un doareenn a-zalc'h ouzh ur c'henenn loet war ar parzh ankevelep eus ur c'hromozom revel (eleze kevarall etre ar c'hromozomoù X ha Y); un doareenn enkilek eo peurliesañ, oc'h anadiñ gant ar paotr, hag o chom mut gant ar plac'h, pa sour war ar c'henenn he allelenn drec'hek loet war ar c'hromozom X all; e se, e vez hevelep regoù hêrezhel (da skouer an daltonegezh pe an hemofiliezh) treuzkaset gant ar merc'hed hag erzerc'haet gant ar baotred (*hêrelezh trevenevel*, Gl. *hérédité diagnostique*) (sl. *caryotype, diagynique, hologynique*).

hérédité maternelle ou **matrocline, matroclinie** ◇ **maternal inheritance** ◇ **hêrelezh vammduat, mammduadezh b.** Bezañs gant ar vugale eus doarenoù o tont an holl pe dost digant ar vamm.

hérédité paternelle ou **patrocline, patroclinie** ◇ **paternal inheritance** ◇ **hêrelezh tadtuat, tadtduadezh b.** Bezañs gant ar vugale eus doarenoù o tont an holl pe dost digant an tad.

hérédité récessive ◇ **recessive inheritance** ◇ **hêrelezh enkilek** Treuzkas un doareenn enkilek (sl. *récessif*).

hérédoataxie cérébelleuse, maladie de Pierre Marie ◇ **hereditary cerebellar ataxia** ◇ **ankedre g. ilpennel a-hêrezh, kleñved Pierre Marie** Anaez familhel hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, o tizhout an oadour yaouank, naouus, *ent klinikel*, dre un digenurzh a rizh ilpennel eus al loc'hadoù, an argenk ilpenndastrizhek, strafuilhoù ar c'homz, nistagmuz, damougoù astirenn reñverek, arouez Babinski hag, a-wechoù, nervennfo gweledel, seizioù lagadloc'hadel, ferennlug, teskad azonou o tedreiñ gorrek war c'hrevusaat betek an andrafted klok; *ent neuziadurel*, dre isteñv tolbezennou kostezel an ilpenn ha, dreist holl, dre zic'henezhadur ar stiradoù livenn-ilpenn ha, leiekoc'h, ar pañsoù adreñv; sellet e vez an ankedre ahêrezh evel lodek en *dic'henezhadur livenn-ilpenn a-hêrezh*.

hérédoégénérescence (pe **hérédoégénération**) **spinocérébelleuse** ◇ **spinocerebellar heredodegenerative syndrome** ◇ **dic'henezhadur g. livenn-ilpenn a-hêrezh** Anvad genadel lakaet war ur stroll anaezioù boutin etrezo an treuzkas hêrezhel, ar furmadurioù gwazhet, ar mod dedreiñ : *kleñved Friedrich, ankedre ilpennel a-hêrezh, treuzseizi dasstrizhek familhel Strimpell ha Lorrain*; gant aozerion 'zo e vez ouzhpennet *kaheristeñv Charcot-Marie-Tooth, misav andamougel ahêrezh Roussy ha Lévy, sklerez kostezel kaheristeñvel yaouere, h.a.*

hérédoégénérescence choriorétinienne ◇ **dic'henezhadur tolgen-luc'hsae a-hêrezh** Daralladur hêrezhel kentrat ha pazennek an dolgensae hag al luc'hsae.

héritabilité ◇ **heritability** ◇ **hêrezhegezh b.** Roadenn stadedel o tewezañ feur ar parennoù hilel e tebegezh erzerc'hadur un doareenn fenotipek lavaret en ur boblañs roet; par eo da rannad an hebiant genotipek dre an hebiant fenotipek.

héritable ◇ **heritable, inheritable** ◇ **hêrezhek aa.** A c'hell bezañ treuzkaset dre ouennañ.

Hering-Breuer : réflexe de ~ ◇ **Hering Breuer reflex** ◇ **damoug Hering Breuer** Heudadur an enanañ dre an enc'hwezhañ, heudadur an ec'hanañ dre an ezc'hwezhañ, an nervenn dispis o vezañ forzh degas an damoug, nervenn ar vegin ar forzh ezkas.

hermaphrodisme ◇ **hermaphroditism** ◇ **uerevegezh b.** Stad etrerevel dibaot, naous dre ar gervezañ en un hinienn eus gwiad klidennel hag a wiad vierrezel; diforc'h e c'hell bezañ ar gonadoù dre amparañ ur glidenn hag ur vierrez, pe kendoueziet e rezh un pe daou *ovotestiz* (sl. *géntosurrénel* : *syndrome* ~).

hermaphrodite ◇ **hermaphrodite** ◇ **1 uerevek aa. 2 uereveg g. -eion** 1 Gant an uerevegezh. 2 Gouziviad uerevek.

herniaire ◇ **hernial, herniary** ◇ **~aveleñ, ~ogad, ogadel aa.** A-zave d'an aveleñ, d'an ogad; sk. : *sac'h ogadel* (Gl. *sac h.*) bogod ampeleñ entoet e treug an aveleñ, ennañ ar flugez ogad; *tachadoù ogadus* (Gl. *zones h.*) lec'hiennoù bresk e speur ar c'hof, ganedigel diwar genttued rizhellel pe arzeuat, en arvar da leuskel ogadoù; *aveleñ gorndaget* (Gl. *pincement h.*) tagelladur diglok un aveleñ bervez hep astal an trehent (sl. *engouement h., étranglement h., incarceration h.*).

hernie ◇ **hernia** ◇ **ogad g., aveleñ b.** Tolzad hevonn furmet gant un organ pe ur parzh organ, ar pervez peurliesañ, aet er-maez eus ar gavenn en endalc'h ent reol, dre un igoreñ naturel pe darvoudel; hervez an organ hag al lec'hiadur, e teskriver : an *aveleñ vorzhedel* pe *a-vorzhed* (Gl. *h. crurale* pe *fémorale*) oc'h ogañ dre walenn ar vorzhed, dindan stagell ar varleñ; an *aveleñ varlennel* pe *a-varleñ* pe *barlennogad* (Gl. *h. inguinale*) o treuziñ speur ar c'hof dre dreug kanol ar varleñ, dreist stagell ar varleñ; an *diskogad* (Gl. *hernie discale*), balirad an disk etre-melloù e-barzh kanol ar melkein diwar an ezvout war dreñv eus ar gronn bouedennek, o tarvezout peurliesañ etre ar 4^e ha 5^e melenn dargreiz hag oc'h amwaskañ an nervenn a-goazez; an *aveleñ c'hremel* (Gl. *hernie hiatale*), ogad ur parzh eus ar stomok dre c'hrem an treizher; an *ogad kaher* pe *kaherogad* (Gl. *hernie musculaire* pe *myocèle*), eztead ur parzh kigenñ dre ur boulc'h darvoudel eus ar gouin lientireñ (sl. *bubo-nocèle, diaphragmatocèle, engagement cérébral, étranglement, éventura-tion, omphalocèle*).

NOTENN : Heñvelster eo *ogad* hag *aveleñ*, nemet ez arverer an termen-mañ diwezhañ evit deanyiñ ogadoù ar ganol vezhur dreist holl.

hernié ◇ **herniated** ◇ **ogat aa., ogadek aa.** A-zivout ur parzh organ oc'h ogañ, o furniñ un aveleñ.

hernieux ◇ **herniated** ◇ **1 ogadek aa. 2 ogadeg g. -eion** 1 Gant un ogad, un aveleñ. 2 Gouziviad un ogad, un aveleñ.

herniographie ◇ **herniography** ◇ **ogadluniñ** Skinluniñ askouezh gouinek an ampeleñ (Gl. *canal péritonéovaginal*) goude ensinklañ ur skindemerenn dourzilezh e-barzh kavenn ar c'hof, evit imbourc'hiñ aveleñnoù barlennel ar vugale e degouezhioù 'zo.

hernioplastie ◇ **hernioplasty** ◇ **speuratelviñ** Erougurañ un aveleñ varlennel dev pa vez bresk kigennoù ar speur, anezhañ dazbidañ ar sac'h hag asparañ speur ar c'hof diwar-bouez un imboud kroc'hen pe lientireñ pe he startaat dre araez un osod.

herniorraphie ◇ **herniorrhaphy** ◇ **speurzlita** Erougurañ un aveleñ varlennel pe vorzhedel, anezhañ dazbidañ ar sac'h ha startaat ar speur dre grafaelañ ribloù ar ganol diwar-bouez neudennoù andeloez.

héroïnomane ◇ **heroinomaniac, heroin addict** ◇ **heroingaezhiad** Gouziviad estoue ouzh an heroin.

héroïnomanie ◇ **heroinomania** ◇ **heroingaezh g., heroingaezhiad b.** Drammestoue ouzh an heroin (diaketilmorfin), danvezenn pistriekoc'h eget ar morfin (sl. *addiction, dépendance, toxicomanie*).

herpangine ◇ **herpangina** ◇ **herpangin g.** Gargadenno c'hwezigennek ar vugale e wezher ar viruz *Coxsackie*.

herpès ◇ **herpes** ◇ **eror g.** Pore henek kiriek dezhañ an *Herpesvirus* kerc'hus d'ar c'hroc'hen ha d'ar gwiad nerval; goude ur c'hentporead enkelat alies e teu erzerc'h un dispuilhad arreadek, degouezhek pe adfeilhus, anafoù kroc'hen e rezh c'hwezigennoù treuzwelus a vent gant ur penn spilhenn, bodet a strolloù e-kreiz un amdioñv ruz; diforc'het e vez : *a*) ar viruz a rizh 1 (*HSV1*), kentporeüs ken abred hag ar vugeliez, e devoud ur munsungenaofo gant terzhienn, c'hwezigennoù war glaourgenn ar genoù, c'hwarrenn is-gaved hag, a-wechoù, kevresaefo ha kornaefo; bennozh d'an antikorfoù e van enkelat ar poreadur nemet e tarvez resmiadoù liesrezh da geñver ar poreoù, ardizh an heol, ar mizioù, ar fromadennoù — emañ an hangaeastaleion avat en arvar a 'n *empennfo erorel* (Gl. *encéphalite herpétique*), grevus, marvus alies pe o lezel arlenadoù brednerval bras; *b*) ar viruz a rizh 2 (*HSV2*), kiriek d'an *eror ganadel* (Gl. *herpès génital*), o treledañ dre drezukas revel; emañ ar vugale ganet gant ur vaouez tredizhet war riskl d'ur pore hollek marvus (sl. *Herpes simplex virus*).

herpès circiné, trichophytie circinée ◇ **tinea circinata** ◇ **trikofitiez kelc'hennek, tagn g. kelc'hennek** Anaf ar c'hroc'hen blouc'h devoudet gant un trikofiton, anezhañ plakennoù kele'hiek hevonn emastennus o c'hoarvezout eus un tachad kreiz azzgel gourc'hennus hag un trobarzh c'hwezigennek ma paota ar foue.

Herpes simplex virus, HVS ◇ **Herpes simplex virus, HVS** ◇ **Herpes simplex virus, HVS** Spesad viruzoù eus kerentiad an *Herpesviridae*, o tevoudañ kentporeadoù lemm strewek heuliet gant poreadoù enkelat hag azblivadoù tamm pe damm mareadek (kornaefo erorel, eror gweuzel adfeilhus); daou rizh : *HSV1, HSV2* (sl. *herpès*) ha tri iskerentiad a reer hiziv eus an *Herpesviridae* : *a*) an *Alphaherpesvirinae*, gougevret outo ar genadoù *Simplexvirus* ha *Varicello-virus*, *β*) ar *Betaherpesvirinae* (genadoù : *Cytomegalovirus* pe *Herpesvirus* denel 5, *Roseolovirus* pe *Herpesvirus* denel 6, an *Herpesvirus* denel 7), *γ*) ar *Gammaherpesvirinae* (en o zouez al *Lymphocryptovirus*, viruz Epstein-Barr pe *Herpesvirus* denel 4 o wazhañ hanbarek al limfokit B, kavet er mononukleoz poreel, e limfom Burkitt hag e kankr ar fric'hargadenn — hep ma c'hallfed arzodiñ dezhañ ur roll devouder en anaeziou-se).

herpétiforme ◇ **herpétiforme** ◇ **erorvanek aa.** Gant neuz an eror, sk. : *livant erorvanek* (Gl. *chancre herpétiforme*).

herpétique ◇ **herpetic** ◇ **1 erorek aa. 2 erorel aa.** 1 Gant an eror. 2 A-zave d'an eror, sk. : *gorank erorel*.

- hétéro-accusation** ◇ ◇ **alldamall** g. Ambren o tougen da anwarzhañ an dud all dre falstamall dezho torfedoù faltaziet pe gwerc'hel; azon stadet er gaoovar hag en darfell.
- hétéro-agglutination** ◇ **heteroagglutination** ◇ **allzazgludañ** Dazgludañ o tarvezout etre gwadoù hiniennoù allspesad.
- hétéroagglutinine** ◇ **heteroagglutinin** ◇ **heteroagglutinin** g. Aglutinin o werediñ war hemati un hinienn allspesad.
- hétéro-anticorps, xéno-anticorps** ◇ **heteroantibody** ◇ **allantikorf** g. Antikorf gwadveizel gwezhus ouzh un antigen o tont eus hiniennoù allspesad.
- hétéro-antigène, xéno-antigène** ◇ **heteroantigen** ◇ **allantigen** g. Antigen oc'h ober furmiñ antikorfoù e gwadveiz hiniennoù allspesad.
- hétéro-immunisation, xéno-immunisation** ◇ **heteroimmunization** ◇ **allspesadhangaeañ, allhangaeañ** Hangaeañ diwar geraezañ ur bevedeg gant un antigen allspesadien.
- hétéro-osmie, hétérosmie** ◇ **heterosmia** ◇ **allc'hwesa** Strafuihl ar c'hwesa, hep ma ve fall dre ret ar c'hwez dec'havaelet (sl. *cacosmie, dysosmie, pseudosmie*).
- hétérocaryon** ◇ **heterocaryon** ◇ **heterokarion** g. Kellig a zo enni lies kraoñell a orin hilel kevarall.
- hétérochromie** ◇ **heterochromia** ◇ **alliv** g. **an envezioù, envezalliv** g. Livrezh kevarall an div ganevedenn, ezreolder hêrezhel treuzkaset er mod trec'hkek.
- hétérochromique : cataracte ~ de Fuchs** ◇ **heterochromic cataract** ◇ **ferennlug envezalliv Fuchs** Azoniad o kevredañ alliv an envezioù, tanijenn korf ar saeoù (koraelfo) hag ur ferennlug endan-bourc'had adreñv.
- hétérochronie** ◇ **heterochronia** ◇ **allgoulz** g. Ezreolder an ampoent ma tinod ur gwriad e-keñver urzh lankadoù diorreadur ar bevedeg (keal arveret en ardarzhouriezh an hanweoù).
- hétérochronisme** ◇ **heterochronia** ◇ **alleiapad** g. Digevatalded leiapad etre div nervwienn, etre un nervenn hag ur gigenn, o skoilhañ ouzh treuzkas an nervlanv.
- hétérodrome** ◇ **heterodromous** ◇ **alldreled** aa. A-zivout treled ezreol an nervlanv er galon.
- hétérogamétique** ◇ **heterogametic** ◇ **heterogametek** aa. A-zivout ur bev a zo daou gromozom kevarall en e c'hametoù; en darn vuiañ eus ar spesadoù loenel ez eo heterogametek ar pared; en denion da skouer ez eus daou gromozom revel kevarall XY gant ar c'houved ha daou gromozom kevelep XX gant ar beneved (sl. *diagynique, diandrique, homo-gamétique*).
- hétérogène** ◇ **heterogenous** ◇ **1 dizungenezh** aa., **allc'henezh** aa. **2 liesgenezh** aa. **3 dizunaozek** aa. 1 Nad eo ket a un natur (gant). 2 A-zivout un ergorenn a zo elfennoù a lies natur ouzh he ober. 3 A-zivout un danvezenn nad eo ket unvan dasparzh he elfennoù en egor (sl. *homogène*).
- hétérogreffe, greffe hétéroplastique** ou **hétérologue** ou **hétérospécifique** ou **xénogénique, hétéroplastie, xénogreffe** ◇ **heterograft, heterologous** or **heteroplastic graft, heterotransplant** ◇ **imboud** g. **allspesadien, allspesadimboud, treuzplantañ allspesadien, allspesadatelviñ** Imboud etre hiniennoù a spesadoù kevarall (sl. *allogreffe, autogreffe, bioprothèse, homogreffe, isogreffe*).
- hétérogroupe** ◇ **heterogroup** ◇ **allrizh** aa. A rizh gwad kevarall.
- hétérogueusie** ◇ **heteroguesia** ◇ **alldañva** Strafuihl an tañva, hep ma ve fall dre ret ar blaz dec'havaelet (sl. *caco-gueusie, dysgueusie*).
- hétérohémolysine** ◇ **heterohaemolysin** ◇ **heterohemolizin** g. Hemolizin o tistrujañ an hemati allspesadien.
- 1 hétérologue, hétéromorphe** **2 hétérologue, xénogénique** ◇ **1 heterologous** **2 heterologous, xenogenic** ◇ **1 allneuz** aa. **2 allspesadien** aa., **allevek** aa. 1 Neuziadur kevarall e-keñver ar parzhioù amezek. 2 (Hangaeoniezh) a-zivout gwidoù, gwadveiz, h.a. o tont eus un hinienn a spesad kevarall.
- hétérophorie, phorie, strabisme latent** ◇ **heterophoria, latent strabismus** ◇ **gouwilc'hañ, loakrerezh** g. **enkelat** Loakrerezh a lakaer da anadiñ dre un tun imbourc'h hepken, anezhañ digevredañ gwelerezh an daou lagad (sl. *ésophorie, exophorie*).
- hétéroptalmie** ◇ **heterophthalmia** ◇ **miliv** g. **an envez, envezviliv** g. Ezreolder livrezh ar ganevedenn en ul lagad, pe en daou.
- hétéroplasie, hétéroplastie** ◇ **heteroplasia, heteroplasis** ◇ **allwe** g. Gwiad, ezreol luniad ha dedroadur e elfennoù, oc'h evodiñ diwar ur gwriad bonan (sl. *hyperplasie, métoplasie, néoplasie*).
- hétéropluide** ◇ **heteroploid** ◇ **heteroploïde** aa. A-zivout kelligoù ezreol a r soma, dezho un niver kromozomou nad eo na par na lieskement da $2n$ (sl. *aneuploïde, haploïde, polyplloïde, triploïde*).
- hétéroprotéine** ◇ **conjugated protein** ◇ **heteroprotein** g., **protein** g. **keveilet** Stroll proteinoù kemplezh, o tisec'h diout dre zourannañ amindrenkennoù ha danvezennoù anproteidk (strolloù prostetek); o isrannañ a reer etre ar glukoproteinoù (mukin), lipoproteinoù, nukleoproteinoù, kromoproteinoù (hemoglobin) ha fosfoproteinoù (kazein).
- hétérosexualité** ◇ **heterosexuality** ◇ **arallreviadezh** b. Tued da serc'hiñ an hiniennoù a-eilrev (sl. *bisexualité, homosexualité*).
- hétérosexuel** ◇ **heterosexual** ◇ **1 a-eilrev** **2 arallreviat** aa. **3 arallreviad** g. **-ed, -ez** b. **-ezed** 1 A-zave d'ar rev gevenep. 2 Gant an tued da serc'hiñ an hiniennoù a-eilrev. 3 Hinienn arallreviat (sl. *bisexualité, homosexuel*).

hétéroside, glycoside ◇ **glycoside, heteroside** ◇ **heterozid** g., **glikozid** g. Seurtad ozidoù o tisoù h diouto dre zourannañ ozioù ha danvezennoù anglukidek (aglikon pe genin) (sl. *glucide, holoside, ose, oside*).

hétérospécifique ◇ **heterospecific** ◇ **1 allspesadek** aa. **2 allspesadel** aa. 1 Gant doareennoù a zo re ur spesad all; dre astenn ster e komzer a *vec'hiegi allspesadek* (Gl. *grossesse h.*) pa vez gant ar vamm hag ar grouell pep a zoareennoù gwad kevarall (sk. : krouell Rh +, mamm Rh -). 2 A-zave da zoareennoù allspesadek (sl. *Rhésus : facteur ~, iso-immunisation*).

hétérotope ◇ **heterotopic** ◇ **allec'hiat** aa. A-zivout un argrezad kalon ezlec'hiat e vroudalf, hemañ o vezañ ent reol ar c'hloer god-kentez (sl. *centre d'automatisme, ectopique, hétérotype*).

hétérotopie ◇ **heterotopy** ◇ **allec'hiadezh** b. Loadur neuziadurel ezreol kelligoù pe gwiadoù (sl. *ectopie, orthotopie*).

hétérotopique ◇ **heterotopic** ◇ **allec'hiat** aa. 1 A-zivout ur furmadur neuziadurel, loet ezreol. 2 A-zivout an dinodiñ eus ur gwiad en ul lec'h eus ar bevedeg ma n'en kaver ket ent reol; ent dibarek : *askornbarañ allec'hiat* (Gl. *ostéogénèse h.*), dec'han furmidigezh gwiad askorn e-barzh gwiadoù diseurt (kigenn, felc'h, gwiad kenglenel) dre imboudañ un drailh glaourgenn c'hwezhi-gell.

NOTENN : Mat e kav an aozerion c'hallek lakaat kemm arver etre TA'' *hétérotope* hag *hétérotopique*, diforc'hidigezh n'hon eus ket kredet adkemer.

hétérotrophe ◇ **heterotrophic** ◇ **diandefivek** aa. A-zivout ar bevion na c'hellont teñvañ nemet dre denañ o boued diouzh danvez bevion all; tri doare a ziforc'her d'an emvoueta diandefivek : an doare *milvevadek* (Gl. *holozoïque*) gant al Loened a zebr hag a goazh o boued, an doare *arvevadek* (Gl. *parasitaire*) gant al Loened pe ar Plant a vev diwar goust bevion all, an doare *kelanadek* (Gl. *saprophytaire*) gant bevion a denn o boued eus danvezioù marv war zispenn (sl. *autotrophe*).

hétérotype ◇ **heterotypic** ◇ **alluniat** aa. A-zivout un argrezad kalon ezreol ent doaread (sl. *hétérotype*).

hétérozygote ◇ **heterozygote** ◇ **allreek** aa. A-zivout un hinienn nad eo ket unrezh an div c'henenn allel war ur re eus he c'hromozomou (da skouer, ur c'henenn reol war an eil kromozom hag ur c'henenn gleñvedel war egile) (sl. *hémizygote, homozygote*).

hétérozygotisme ◇ **heterozygosity** ◇ **allreegezh** b. Ar bezañ allreek.

hétéro-

• *glandes salivaires hétérotopiques* gwagrennoù halviñ allec'hiat • *hémianopsie homonyme, hétéronyme* ledangwel unsko, diunsko • *insectes Hémiptères, Hétéro-ptères* amprevaned Hemipter, Heteropter • *organisme hétérologue* bevedeg allspesad • *sérum hétérologue* gwadveiz allspesadien • *substances hétérocycliques* danvezennoù heterokiklek.

heuristique ◇ **1 heuristic** **2 heuristics** ◇ **1 darnodel** aa., **darnodour** aa. **2 darnodiñ**, **darnoderezh** g. **3 darnodouriezh** b. 1 A-zivout un imbouc'h o vont gant hent an darnodiñ, eleze ar *c'herzhed dre arnodiñ ha kammañ* (Gl. *démarche par essais et erreurs*). 2 Diskoulmañ ar c'hudennoù dre ober stad da bep kammed eus an disoc'hou kent. 3 Hentennouriezh an darnodiñ, a-gevenep d'an *dreolouriezh* (Gl. *algorithmique*), hentennouriezh an imbouc'h renet diouzh un heuliad reolennoù raksavelet.

hexacante : **embryon** ~ ◇ **hexacanth embryo** ◇ **rizhell** b. **heksakant** Rizhell an tenia, outi tri re vac'higoù a ro tro dezhi da guitaat ar ganol vezhur dre dreuziñ ar glaourgenn ha da dremen e-barzh ur gorrwazhiedenn wad pe limf; kaset gant an amred e tegouezh en un organ (an avu dreist holl) ma c'hell dec'han ur c'hist hidatek pe un ekinokokoz (sl. : *cysticercose*).

hiatal ◇ **hiatal** ◇ ~ **grem** (g.), **gremel** aa. A-zave d'ur grem (sl. *hernie*).

hiatus ◇ **hiatus** ◇ **grem** g. Igorenn neuziadurel e rezh ur faout, sk. : *grem treizherel ar gelc'hspuenn* (Gl. *hiatus œsophagien du diaphragme*).

hibernation artificielle ◇ **artificial hibernation** ◇ **goañvoriñ kalvezadel** Arouarekaat arc'hwelioù ar bevedeg dre heudañ ar reizhiad nervstruzhel diwar-bouez liaoù nervisreer ha dic'hoster kevret gant ur yenata holle dre areaz godelladoù skorn.

hibernome ◇ **hibernoma** ◇ **hibernom** g. Yoc'henn endan-groc'hen kuñv dibaot sezet er gazel dreist holl, anezhi un tolzad behin gell heñvel a-walc'h ouz ar gwiad behinel bezant e poullkreiz al loened goañvorer.

hibernothérapie ◇ **hibernotherapy** ◇ **goañvorgurañ** Arver yac'hadel ar goañvoriñ kalvezadel.

hidradénome ◇ **hidradenoma** ◇ **hidradenom** g. Teskad adenomou bihan evodet diwar ar gwagrennoù c'hwezparañ, dezho neuz krugrennoù kantalc'hek; div furm a zeskriver : an *h. dispuilhat* (Gl. *h. éruptif*) sezet war dalbenn araok ar brusk, an *h. ar malvennoù traoñ* (Gl. *h. des paupières inférieures*) a gaver alies gant ar maouezed kozh.

hidrorrhée ◇ **hidrorrhoea** ◇ **darc'hweziñ**, **darc'hwezenn** b. C'hweziñ reñverek, c'hwezenn builh.

hidrosadénite, hidradénite ◇ **hidrosadenitis** ◇ **hidrozadenit** g. Pugnez bihan ront diwar ur wagrenn c'hwezparañ sezet er gwiad kellaouek endan-groc'hen eus poull ar gazel.

hidrose ◇ **hidrosis** ◇ **hidroz** g. Strafuilh arc'hwelel eus ar c'hwezparañ.

hile ◇ (TA) **hilus** ◇ **begel** g. Tachad pukadek war un organ (skevent, avu, lounezh) ma ento an duilh gwazhiednervel.

NOTENN : Gant Br. *begel* (TA *umbilicus*) ez arouezer ivez ar gleizenn eus enlenad ar *funig vegel*; en arver enta, pa vez ezhomm hepkoriñ ar c'hemmesk, e tere destiañ Br. *begel* (TA *hilus*) : *begel (ar) skevent, (an) avu, h.a.*

Hippocrate : **serment d'~** ◇ **Hippocratic oath** ◇ **le** g. **Hippokrates** Le touet gant ar vezeion goude darbenn an doktoarelezh, ma ouestlont drezañ doujañ da zivezouriezh o micher.

hippocratique : **doigts** ~s, **hippocratism** digital ◇ **clubbing**, **drumstick fingers** ◇ **bizied bazhoulek**, **bazhoulegezh b. ar bizied** Distummadur ar bizied daouarn, a stader er skeventadoù henek hag ivez en anaezioù kalongwazhiedel dulaseiat, en amoebiaz, e polipoz ar pervez, anezhañ bolc'hadur bouedenn an oëñs pellek ha krommadur an ivinoù o reiñ d'ar bizied neuz ur vazh taboulin pe ur vazhouleñn.

hippocratique : **faciès** ~ ◇ **Hippocratic facies** ◇ **enebrezh g. hipokratek** Dremm distreset bras, diougan ur marv hogozek, roet dezhi an anvad-se pa voe deskrivet gant Hippokrates.

hippocratism ◇ **hippocratism** ◇ **1 hipokratouriezh b. 2 hipokrategezh b.** 1 Doazhadur Hippokrates, mezeg gresian (-480 - -370), a ergemenne an arsellin hag an arnodin desoliet; hervezañ e tle ar mezeg studiañ an natur er stourm a ren ouzh ar c'heñved ha treiñ e strivoù a un tu ganti. 2 Distummadur dibarek ar bizied (sl. **hippocratique** : **doigts** ~s).

hippothérapie ◇ **therapeutic equitation** ◇ **marc'hegerezh yac'hadel**, **marc'hekurañ** Arver yac'hadel ar marc'hegerezh.

hippuricurie, **hippurie** ◇ **hippuria** ◇ **troazhippuregezh b.** Bezañs en troazh a drenkenn hipurek pe a hipuratoù.

hippus, **athétose pupillaire** ◇ **hippus** ◇ **hipuz g., mabatetoz g.** Pebeiladur korvezek isvull hag usvull ar mab lagad; **hipuz talmek** (Gl. *hippus circulaire*, *pouls pupillaire*), seurtad hipuz stadet a-wechoù er skorted aortek, an isvull o klotañ gant ar sistol, an usvull gant an diastol.

Hirst : **réaction de** ~ ◇ **Hirst's test** ◇ **prouad g. Hirst** 1 Ervezh gwadveizel spesadel d'ar grip : skoilhet e vez dazgludadur hemati ar yar dre virus ar grip gant gwadveiz ar c'houzviaded o deus pe o deus bet ar grip. 2 Ervezh heñvel (skoilhañ ouzh ar gwaddazgludañ) o kevaraezañ deznaouiñ gwadveizel ar jotorell.

hirsutisme ◇ **hirsutism** ◇ **kreñvegezh b.** Blevegezh reñverek a c'hennadur gourevel war an dremm hag ar c'horf, e dalc'h an androgeneier, lodek en azoniad ar c'hourevezh (sl. **hyperpilo-sité**, **virilisme**).

Hirtz : **indice de** ~ ◇ **Hirtz index** ◇ **feuriader g. Hirtz** Regad o tewaterhañ dec'honiñ ar bruski, diforc'h etre an amregadoù enanalañ hag ec'hanelañ muzuliet e live ar begoù bronni, ent keitat par da 7 cm gant an oadour.

hirudinase ◇ **hirudinasis** ◇ **gelaouigenn b.** Arvevadegezh diwar ar gelaouenned; er broioù trovanel e stader anaezioù grevus diwar an erialerezh gant gelaouenned entoet dre an igorennoù naturel.

hirudine ◇ **hirudin** ◇ **hirudin g.** Danvezenn bolipeptidek bezant e gwagrennoù halviñ ar gelaouenned, a zewerc'her ivez dre enaozañ hilourel, ganti ur gwered eneptromboz spesadel; trombindolc'her galloudek hep gwered war ar pladanou.

His : **faisceau de** ~, **faisceau atrioventriculaire** ◇ **atrioventricular bundle**, **His's bundle** ◇ **hordenn b. genter-kofig**, **hordenn His** Darn eus an trevnad kalonaoter, deraouet er c'hloer kenter-kofig (Gl. *nœud d'Aschoff-Tavara* pe *atrioventriculaire*), rannet he c'hef etre daou varr, dehou ha kleiz, en erdu da bep a gofig, hag o vont ar skoultrennadurioù anezho d'ober rouedad Purkinje (sl. **cardionecteur** : **appareil** ~, **Purkinje** : **réseau de** ~).

hisien ◇ **hisian** ◇ **hisel** aa. A-zave d'ar hordenn genter-kofig pe hordenn His.

histaminase ◇ **histaminase** ◇ **histaminaz g.** Enzim o tistrujañ an histamin er gwad hag er gwiadoù.

histamine ◇ **histamine** ◇ **histamin g.** Deverad diwar an imidazol, bezant en e furm anniñvek e-barzh gwiadoù an holl vronneged, da berzhioù dezhañ fraouat borc'hadur ar sug kreuz, argrezañ ar gwiennou levn hag an talmerennigoù, frankaat ha heforshaat ar c'horrwazhied; hanterad kimiek an dreistkizidigezh kentizhek; borc'het e vez gant ar granulokit bazofil hag ar mastokit, kadavet e-barzh ar greunenn-adoù anezho ha dilaosket da geñver ar bleuz darwalladel; o tasperzhiañ ivez en erzerc'hadou allergiek all : astma, sifern ar bleuñv, linadell, h.a. (sl. **choc anaphylactique**, **mastocyte**, **récepteur histaminique**).

histamine : **épreuves ou tests à l'**~ ◇ **histamine tests** ◇ **prouadoù l. (g.) an histamin** 1 Araezad evit dastum sug kreuz, anezhañ pibennañ ar stomok goude ensinklañ 1/2 pe 1 mg klorhidrat histamin dindan ar c'hroc'hen 2 araezad evit imbours'hiñ perzhded an amred talmerel, anezhañ muzuliañ ar pad ma ranker gortoz dispuilh ur grugenn linadell goude ensinklañ histamin en derm 3 araezad evit deznaouiñ ar feokromokitom, dre zec'han ur frapad uswask talmerel da heul an ensinkladur engwazhiennel eus 1/40 mg histamin (imbours'hadenn dañjerus).

histaminémie ◇ **histaminaemia** ◇ **histaminwadvec'h g.** Feur an histamin er gwad, sellet evel reol etre 40 ha 60 µg/l.

histaminergie ◇ **histaminergy** ◇ **histaminwerc'hañ** Dilaoskiñ histamin pe danvezennou nes a c'hoarvezfe gant nervernoù o wezhiañ dre hevelep hanteradoù kimiek.

histaminopexie ◇ **histaminopexy** ◇ **histaminlenañ** Dezerc'hel an histamin gant danvezennou 'zo : mukin, heparin ha gant ar plasmapeksin I, globulin eus plasma ar gwad a ra diouer d'ar c'houzviaded allergiek.

histidine ◇ **histidine** ◇ **histidin g.** Amindrenkenn parzhiat er proteinoù, a zisoc'h an dekarboksiladur anezhi en histamin.

histidinémie ◇ **histidinaemia** ◇ **1 histidinwadvec'h g. 2 gwadhistidinegezh b.** 1 Feur an histidin er gwad. 2 Kleñved hêrezhel enzimatek diwar diouer an histidaz, enzim o treuzfurmiñ an histidin e trenkenn urokanek, naouus dre ar gwadusvec'h histamin hag, ent klinikel, dre an dilerc'h kefredel, strafuilhoù ar c'homz hag an amzifenn ouzh ar poreadoù.

histidinurie ◇ **histidinuria** ◇ **troazhhistidinegezh b.** Bezañs histidin en troazh.

histiocytes, **macrophages** ◇ **histiocytes**, **macrophages** ◇ **histiokit s., makrofag s.** Kelligoù bras (15 da 20 µm) o teverañ eus monokit ar gwad, treuzet ganto speur ar c'horrwazhied ha lenet er gwiad kenglenel, er gwerblennoù, er felc'h, er mel eskern, en avu, el levrgennoù, el logigoù skevent ha, paot kenan, en anafoù poreel; naouus dre ur grañnell aront hag ur c'hitoplasm arc'hlas,

ennañ greun azurofil ha rannigoù estren euvret niverus ; o arc'hwel pennañ eo ar fagokitoz, dasperzhiañ a reont ivez e gwikefreoù an hangaeñ.

histiocytes bleus de mer : syndrome des ~ ◇ **sea-blue histiocytosis** ◇ **azoniad an histiokit glas-mor, histiokitoz glas-mor** Seurtad lipidoz hêrezhel kuñv treuzkaset er mod enkilek war a hañval, naous dre usvent leiek an avu hag ar felc'h hag alies dre ur purpura hag un olpladanoù, dibaot dre un ikter, strafuilhoù lagadel, nerved, skeventel ha kroc'henek ; soularget eo ar felc'h gant sfingomielin pe glikosfingolipidoù hag aloubet ar mel eskern gant an *histiokit glas-mor*, anezho kelligoù retikuloendotelel a 20 da 60 µm treuzkiz, puilh en o c'hitoplasm greunigoù lipidek o wiskañ al liv pers, “glas-mor”, dre galvezder Giemsa ; dindan gevarguz e chom arbenn, ardarzh ha betek staelad nozologek an anaez-mañ.

histiocytome ◇ **histiocytoma** ◇ **histiokitom** g. Yoc'henn evodet diouzh kelligoù ar reizhiad retikuloendotelel.

histiocytose ◇ **histiocytosis** ◇ **histiokitoz** g. Anvad rumm un teskad anaezioù naous dre neridigezh an histiokit, bet rummet gant an *Histiocyte Society* (1987) e tri stroll : 1) an *histiokitozioù langerhansel*, anezho ar granulom eozinofil, kleñvedoù Hand-Schüller-Christian ha Letterer-Siwe ; 2) an *h. sellet evel erwezhiat*, kleñved Rosai-dorfman hag ar ksantogranulom yaouerel ; 3) an *anaezioù histiokitel yud* : histiokitoz yud, leukemiezh vonokitel, limfom histiokitel.

histo-enzymologie ◇ **histoenzymologie** ◇ **gwiadenzimouriezh** b. Studi an enzimoù kelligel e-kerz imbourc'h korrgreskerel ar gwiadoù.

histo-incompatibilité, incompatibilité tissulaire, incompatibilité de greffe ou de transplantation ◇ **histoincompatibility** ◇ **digempad g. gwiael, gwiadkempad g., digempad imboudel pe treuzplantadel** Keñver etre gwiadoù div hinienn hevelep ma ne c'hallfed imboudañ un organ a 'n eil ouzh eben hep risklañ un distaol ; e dalc'h kevarallded gladoù hilel ar roer hag ar roadour, alese ar vezañs, gant ar roer, eus antigenoù eritrokitel pe leukokitel-pladanel ezvezant gant ar roadour (sl. *histocompatibilité, incom-patibilité sanguine*).

histochimie ◇ **histochemistry** ◇ **gwiadkimiezh** b. Studi an dazgweredoù kimiek c'hoarvezet e-barzh ar c'helligoù, a rener gant ur c'horrgresker war skejennoù gwiael.

histocompatibilité, compatibilité tissulaire, compatibilité de greffe ou de transplantation ◇ **histocompatibility** ◇ **kempadusted b. wiadel, gwiadkempadusted b., kempadusted imboudel pe treuzplantadel** Keñver etre gwiadoù div hinienn hevelep ma c'hallfed imboudañ un organ a 'n eil ouzh eben hep risklañ un distaol ; amplegad berzh an imboudañ eo ma ve unrezh pe dost gladoù hilel ar roer hag ar roadour, eleze ma ve enno an hevelep genennoù gwiadkempadusted ; anez da se e vez distaolet an imboudenn diwar-bouez un erwezhiad hangaeel ; kemm a lakaer etre an antigenoù na gevaraezont e mod ebet ar gempadusted : antigenoù ar reizhiad eritrokitel ABO hag ar reizhiad HLA (digempad muiek), o tiennegañ an imboudañ, hag an antigenoù kiriek d'un digempad leiek a rankor neptuñ dre ziounit hangaeastalerioù (sl. *antigène tissulaire, groupes tissulaires, rejet de greffe, système HLA*).

histogénèse ◇ **histogenesis** ◇ **1 gwiadparañ 2 Gwiadparadurezh** b. 1 Diorren rizhellel ar gwiadoù. 2 Rann eus ar Rizhelloniezh o plediñ gant ar gwiadparañ.

histogénétique ◇ **histogenetic** ◇ **1 gwiadparadel aa. 2 gwiadparadurel aa.** 1 A-zave d'ar gwiadparañ. 2 A-zave d'ar Wiadparadurezh.

histogramme ◇ **histogram** ◇ **tellun** g. Kevregad o terc'hennañ gwerzhadoù un arventenn dasparzhet e rummoù dre venegiñ niver an hiniennnoù enbeziet e pep rumm (tellun skalierek).

histoïde ou histioïde : tumeur ~ ◇ **histoid tumor** ◇ **yoc'henn histoidel** Yoc'henn evodet diouzh ur gwiael oadour peurziforc'hek.

histologie ◇ **histology** ◇ **Gwiadoniezh** b. Rann eus ar Vevoniezh o studiañ ent korrselladel ha dangorrselladel neuziadur ar gwiadoù (korfadurezh korrselladel, gwiaedurezh), ar genaoc'h kimiek hag ar perzhioù arc'hwelel anezho.

histolyse ◇ **histolysis** ◇ **gwiadloezañ** Distrujañ ar gwiadoù.

histone ◇ **histone** ◇ **histon** g. Anvad rumm proteinoù eeun (holoproteinoù) bazek erret ouzh an DNA ebarzh an nukleozomoù, dezho ur gefridi goudaviñ anspesadel en treuzkas eus ar c'hemennad hilel.

histopathologie ◇ **histopathology** ◇ **gwiadkleñvedouriezh** b. Studi korrgreskerel ar gwiadoù hag an organoù klañv.

histoplasmosse ◇ **histoplasmosis** ◇ **histoplasmoz** g. Mikoz diwar spor *Histoplasma capsulatum*, foue eus kerentiad ar *Moniliaceae*, dewentet pe, dibaotoc'h, euvret.

histologi-

- à structure histologique épithélioïde epitelioidel luniadezh e wiadoù
- *démence présénile caractérisée histologiquement par une atrophie du cortex* envedi rakkoziadel naous ent wiadurel dre isteñv ar bluskenn
- *histologiquement bénin* kuñv ent wiadoniell
- *lésion histologique* anaf gwiaedurel
- *préparation histologique* darbaradenn wiadoniezh
- *selon le type histologique du cancer* hervez rizh gwiaedurel ar c'hankr
- *structure histologique* luniadezh wiadel.

histrionisme ◇ **histrionism** ◇ **ramlougañ, ramlougrezh** g. Mod realañ, darfellek peurliesañ, ur gouzviad techet da c'hoari rolloù disgougel ha kerc'hus brizhc'hoarivaek e plegennoù ar gedvuhez.

HIV, virus de l'immunodéficience humaine, VIH ◇ **HIV, human immunodeficiency virus** ◇ **HIV, viruz an hangaezivig denel, VIHAD** Hadenn an haza, lentiviruz etre 110 120 nm treuzkiz, 2 volekul RNA hag un transkriptaz gindu e-barzh e

nukleokapsid; dre lenañ diwar-bouez e c'holo ouzh kennenn al limfokit CD4, e pore hag e tistruj ar re-mañ; gwazhañ a ra ivez ar makrofag (sl. *antirétroviral, sida, transcriptase inverse*).

Hodgkin : *maladie de ~, lymphogranulomatose maligne* ◇ **Hodgkin's disease, Pel-Ebstein disease** ◇ **kleñved Hodgkin** Anaez naouus, *ent klinikel*, dre goevadur ar gwerblennoù bas ha don, usvent ar fêc'h, un derzhienn didorrennek pe adfeilhus, a-wechoù mareadek, arfaoù kroc'hen debroneiat, eleozinofil; marvus ent emdarzh a-benn un nebeut bloavezhioù; gwelladus dre ar skingurañ agreñv hag ar c'himigurañ kevredet, pareadus zoken pa vez lec'hiek an tizhadur; *ent neuziadurel*, dre freuzadur luniadezh ar gwerblennoù dre un neridigezh limfoidel ha retikulo-endotelel kevret gant ar skleroz; dindan gevarguz e chom arbenn ha zoken rummad nozologek ar c'hleñved : nes eo d'ar yoc'hennoù yud dre vezañ an dassezioù flugezel, dre e arvez hollek avat e tenn d'ar poreoù — kevredet e vez a-wechoù gant ur virus EB; dre zoareoù 'zo ez eo heñvel ouzh ar c'hleñvedoù dre negez an hangae kelligel (sl. *carence immunitaire, lympho-sarcome*).

Hoffmann : *réflexes ou signes de ~* ◇ **Hoffmann's signs** ◇ **arouezioù Hoffman** 1 Anadenn a-geñver gant broudadusted vras an nervennoù en detaniezh : awalc'h eo kiziata nervennoù an tiriadoù kroc'hen kammeraezek evit delankañ andagoù. 2 Damoug plegañ an holl vizied diwar giziata skañv pe piñsañ bouedenn oes pellek ur biz dambleget, a erzerc'hafe un tizhadur eus ar stird pikernennek. 3 Hentenn erc'hwiliañ un nervenn drobarzh dre studi erwezh ur gigenn ouzh ur steudad tredansakoù treuzkaset dre he nervenn loc'hañ.

hog-flu, grippe porcine ◇ **hog-flu** ◇ **grip g. ar moc'h** Influenza darreuziadek ar moc'h, heñvel ouzh grip an dud, evel hemañ devoudet gant ar virus H₁N₁, an hini a voe kiriek d'ar grip spagnat eus 1918 ha d'ar bedreuziad eus 2009-2010 (sl. *grippe*).

holandrique ◇ **holandric** ◇ **hollc'houevel** aa. A-zivout treuzkas hêrezhel ur reg pe un namm eus an tad d'e holl vibion, e holl verc'hed o vezañ salv; e dalc'h loadur ar genennoù kiriek war ar parzh ankevelep eus ar c'hromozom revel Y (sl. *hérédité liée au sexe*).

holocrine ◇ **holocrine** ◇ **largezvorc'hat** aa. A-zivout ur mod ezvorc'hañ ma vez ezvevnet ar gellig en he fezh war un dro gant he borc'hadenn, sk. : ar gwagrennoù soav (sl. *apocrine, eccrine, mérocrine*).

holodiastolique ◇ **holodiastole** ◇ **holodiastolek** aa. A-zivout un anadenn (trouz, sourr, h.a.) o padout a-zoug an diastol.

hologynique ◇ **hologynic** ◇ **hollvenevel** aa. A-zivout treuzkas hêrezhel un namm eus ar vamm d'he holl verc'hed, he holl vibion o vezañ salv (rizh hêrelezh nemedennek).

holoprotéine ◇ **simple protein** ◇ **holoprotein g., protein g. eeun** Stroll proteinoù a zisoc'h diout dre zourrannañ amindrenkennoù hepken pe dost; o isrannañ a reer e protaminoù, histonoù, albuminoù, globulinoù ha skleroproteinoù; en o zouez emañ ar seromalbumin, ar seromglobulin, al laktalbumin, ar c'heratin, h.a. (sl. *hétéroprotéine, protéine*).

holoside ◇ **holoside** ◇ **holozid** g. Unan eus an daou seurtad ozidoù (glukid), amparet gant ozioù nemetken; hervez niver ar molekul oz a ya d'ober o molekul e tiforc'her an diholozidoù (sakaroz), an tri-, tetra-, poliholozidoù (ampezh, glikogen, h.a.) (sl. *glucose, hétéroside*).

holosystolique ◇ **holosystole** ◇ **holosistolek** aa. A-zivout un anadenn (trouz, sourr, h.a.) o padout a-zoug ar sistol.

holothymique : *affectivité ~* ◇ **holothymic affectivity** ◇ **kantaezelezh b. holotimek** Domani donañ ar gantaezelezh (anvet ivez *kantaezelezh diaz*, Gl. *affectivité de base*).

NOTENN : Un tañva eus hanc'heriegoù ar Vredoniezh a ro an termen-mañ bet arveret gant ar bredvezeg Henry Ey (1900-1977) evit arouezañ ambredadoù elfennel evel ar fromoù, an imor, santad ar bevañ, a-gevenep da zomani an trivliadoù kemplezh pe *affectivité catathymique* (Br. *kantaezelezh katatimek*).

Holter : *système ou méthode de ~* ◇ **Holter's recording** ◇ **trevnad lerc'hwezañ Holter** Trevnad lerc'hwezañ baleadel a-gendalc'h e-doug eurvezhioù (un devezh klok peurliesañ) eus ar c'halonvarrwezañ, arveret evit diurnat strafuilhoù ar gorvez hag an ezreolderioù a orin kuruneret.

homéobox ◇ **homeobox** ◇ **homeoboks** g. Kemlad DNA trefest (eleze kuit a zargenadoù e-doug an emdroadur) bezant er *gen homeotek* hag er gen o reoliñ an diorren (sl. *homéotique : gène ~*).

homéopathie ◇ **homoeopathy** ◇ **homeopatiezh** b. Hentenn yac'hadel diazezet war ar bennaenn "parañ an heñvelion dre an heñvelion", anezhi diounit a zoenadoù boc'hedek danvezennoù a arzoder dezho gweredoù heñvel ouzh an erzerc'hadoù kleñvedel a venner diren.

homéostasie ◇ **homeostasis** ◇ **arwastadiñ** Tued da zerc'hel ar gwastadennoù bevedel (Gl. *constantes physiologiques*) : gwrezverk, tant kalongwazhiedel, kenaoz ar gwad, h.a., etre o hinoù reol (sl. *équilibre*).

homéotherme ◇ **homoeothermal, thermal controller** ◇ **emwrezat** aa., **gwrezreoler** aa. A-zivout al loened o piauañ an arc'hwel arwastadiñ o gwrezverk, eleze a zo diamzalc'h o gwrezverk diouzh gwrezverk ar metoù.

homéotique : *gène ~* ◇ **homeotic gen** ◇ **genenn u. homeotek** Genenn en he dalc'h hanrannadur korf ar rizehell, bet dizoloet er c'helien drozofil — er re-mañ, da skouer, diwar un dargennad homeotek (Gl. *mutation homéotique*), ez a ur re dastornelloù d'ur re bavioù; unan eus ar c'hemaladoù a ya d'ober ar gen homeotek eo an *homeoboks* (sl. *homéobox*).

homing : *phénomène du ~, écotaxis* ◇ **homing phenomenon** ◇ **anadenn ar c'hêrat** Perzh gant ur rumm leukokit da emdizhañ etrezek ur gwriad dibarek.

NOTENN : Ar c'hemeradur-mañ eus Sz. *homing* zo un astenn eus ar ster bevoniezh ha trevoniel : *homing* an eoged eo an distro anezho, da geñver an dozviñ, d'ar stêr ma voent ganet.

homme de référence ◇ **reference man** ◇ **gouevr g. -ed dave** (Mezhuroniezh) Gouevr derc'hek, oadet a 25 bloaz, yac'h, 174 cm savder, 73 kg tolz, o vevañ en un hinad kerreizh, o ren un oberiezh reol, a zo e ezhomm gremm 13,4 kJ bemdez (sl. *femme de référence*).

homme raide ou **rigide** ◇ **stiff man syndrome** ◇ **azoniad an den stegn** Azoniat naouus dre ur reuted argammedek ha deiltro eus kigennoù ar c'hef hag an izili, kevret gant andagoù laurus ken garv ha dargrezadoù an tetanoz, o tedreiñ d'ar marv dindan un nebeut bloavezhioù; dianav eo e arbenn.

homme standard ou **moyen** ◇ **standard man** ◇ **den skoueriek** Delvan derc'hek eus bevedeg an oadour, o teverkañ ar pouez, ment an organoù ha kenaoz kimiek ar gwiadoù, bet aozet gant *Kengor ar skinward* war-benn amparañ ur bon boutin evit savelañ an doenadoù uc'hek aotreadus.

homochromie ◇ **procrypsis** ◇ **arunlivañ, arunliv g., erguzhañ** Perzh gant loened 'zo da vont a liv gant ar metoù; anv a reer eus *arunliv fest* (Gl. *h. fixe*) pa chom digemm livrezh al loen, a neuz gant ar metoù ma vez boas, eus *arunliv keflen* (Gl. *h. mobile*) pa argemm buan livrezh al loen da heul hini ar metoù; an termenou Sz. *procrypsis*, Br. *erguzhañ* a laka e penn kont ar pal arzodet d'ar arunlivañ : emwareziñ ouzh ar preizhered.

homocystinurie ◇ **homocystinuria** ◇ **troazhhomokistinegezh b.** Bezañs homokistin (amindrenkenn sulfuret) en troazh, arouez vevoniel ur c'hleñved enzimetek diwar ur strafuilh eus kennevid ar metionin, naouus *ent klinikel* dre un teskad kammeuziadoù, ezreolderioù an atel, ezlec'h ar ferenn, dilerc'h bred, barradoù glizi; kleñved hêrezhel treuzkaset er mod enkilek aotozomek.

homogamétique ◇ **homogametic** ◇ **homogametek aa.** A-zivout ur bev a zo daou gromozom kevelep en e c'hametoù; en darn vuiañ eus ar spesadoù loenel ez eo homogametek ar paretzed; en denion da skouer ez eus daou gromozom revel kevarall XY gant ar c'houreved, spizet neuze evel heterogametek, ha daou gromozom kevelep XX gant ar beneved (sl. *diagnyrique, diandrique, hétérogamétique*).

homogène ◇ **homogenous** ◇ **1 2 ungenezh aa. 3 unaozek aa., unneuziek aa.** 1 A un natur (gant). 2 A-zivout un ergoren a zo elfennoù a un natur ouzh he ober. 3 A-zivout un danvezenn a zo unvan dasparzh he elfennoù.

homogénéisation ◇ **homogenization** ◇ **unaozekaat** Treuzfurmiñ emdarzh pe gwezhiet dre araezioù fizikel pe gimiek un aozenn vevedel en ur metoù unvan; *u. ar skopadoù* (Gl. *h. des crachats*) hentenn arglask bazhilli Koch, anezhi berusaat ar borc'hadoù analadel evit dispenn ar glaour ha tronizhañ evit daspugn ar bazhilli.

homogrefe, allogrefe, greffe allogénique ou **homologie** ou **homéoplastique, homéogrefe, homéoplastie** ◇ **homograft, homotransplant, homoplasty** ◇ **imboud g. unspesadien, unspesadimboud, treuzplantañ unspesadien, unspesadatelviñ** Imboud etre hiniennoù a unspesad hag a c'hlad hilel kevarall (sl. *allogrefe, autogrefe, bio-prothèse, hétérogrefe, isogrefe*).

homolatéral, ipsilatéral ◇ **homolateral** ◇ **a-gendu** A un tu er c'horf (sl. *controlatéral*).

1 homologue, homéomorphe 2 3 homologue 4 homologue, allogénique ◇ **1 2 4 homologous 3 homologue** ◇ **1 2 kevelep aa. 3 keveleb g. 4 unspesadien aa.** 1 A-zivout parzhioù ar c'horf o kenglotañ etre ar spesadoù. 2 A-zivout an daou gromozom eus ur re. 3 Parzh, unvez, h.a. kevelep. 4 A-zivout ur gwiad pe un organ o tont eus un hinienn unspesad hag a c'henezh antigel kevarall.

homosexualité ◇ **homosexuality** ◇ **heñvelreviadezh b.** Tued da serc'hiñ an hiniennoù a-genrev.

homosexuel ◇ **homosexual** ◇ **1 a-genrev 2 heñvelreviat aa. 3 heñvelreviad g. -ed, -ez b. -ezed** 1 A un rev (gant). 2 Gant an tued da serc'hiñ an hiniennoù a-genrev. 3 Hinienn heñvelreviat (sl. *bisexualité, hétérosexuel*).

homozygote ◇ **homozygote** ◇ **unreek aa.** A-zivout un hinienn a zo unrezh an div c'henenn allel (reol pe gleñvedel) war ur re eus he c'hromozomoù (sl. *gène, hétérozygote*).

homozygotisme ◇ **homozygosity** ◇ **unreegezh b.** Ar bezañ unreek (sl. *heterozygosity*).

honoraires ◇ **honorarium** ◇ **briverzh b. -ioù** Kevuziadur evit gwazadoù a-berzh un den oc'h embreger ur vicher frank (mezeg, breutaer, h.a.).

Hoof : **syndrome de ~** ◇ **Hoof's syndrome** ◇ **azoniad Hoof** Lipidwadisvec'h familhel naouus dre ur gorreded, anafoù eritemgourc'hennus ar fas hag an eizhaennoù, ur mideñv a 'n ivinoù, a 'r blev hag a 'n dent hag a-wechoù un dic'henezhadur eus tablezenn al luc'hsae; izel eo feur holl lipidoù ar gwad e-maez ar β-lipoproteinou; notañ a reer ouzhpenn ur gwadusvec'h fosfatoù hag un amindrenkennegezh a 'n troazh.

Hoover : **signe de ~** ◇ **Hoover's sign** ◇ **arouez b. Hoover** Leiadur diac'hinek treuzkiz diaz ar bruska da geñver an enanalañ, stadet er bronkezskeventad stevius.

hôpital ◇ **hospital** ◇ **ospital g. -ioù** Diazezadur ma reer an imboure'hiou hag ar prederioù mezegel na c'haller ket ober er gêr dre arbennoù kalvezel pe armerzh, o herberc'hiañ gouzviaded pe ouzh o degemer e kuzuliadurioù diavaez; anvad a zere hepken ouzh ar c'hurdiou a zo enno da nebeutañ ur wazrann vezekniezh hollek, ur wazrann surjianerezh hollek, ur wazrann amiegouriezh, ur wazrann skinouriezh, ur wazrann vabouriezh, un imboure'hva bevoniezh vezegel, un aozadur dent-ouriezh ha, diouzh an dro, unvezioù evit ar prederiadoù gourarbennikaet.

NOTENN : Kemm a lakaer etre Br. *ospital* ha Br. *linikenn* (sl. *clinique*), en ur reiñ da Br. *klañvdi* un erdal engronnus ; gant Br. *kurdi* (Gl. *établissement de soins*) emañ an erdal ledanañ (sl. *centre hospitalier*).

hôpital de jour ◇ **day hospital** ◇ **ospital deiz, deizospital** g. Ospital ma herberc'hier ar glañvourion e-pad an deiz hepken, pa dremenont o nozioù en o c'hêr.

hôpital de nuit ◇ **night hospital** ◇ **ospital noz, nozospital** g. Kurdi o reiñ herberc'h d'ar c'houziviaded e-pad an noz hag e-maez o eurvezhioù labour.

hôpital local ◇ ◇ **ospital lec'hel** E Frañs, kurdi foran gouestlet d'an herberc'hiadoù berrbad evit ar prederiañ mezegel hag an azgouestaat pe c'hoazh da herberc'hvezhioù hirbad ar c'houziviaded amzalc'hiat.

hôpital rural ◇ ◇ **ospital ploue** Klañvdi o c'hoarvezout eus ur wazrann vezekniezh hag ur wazrann amieg-ouriezh pe eus an eil no eben hepken ; e Frañs, abaoe ul lezenn eus 1971, e reer eus hevelep ospitalioù Gl. *unités d'hospitalisation* (Br. *unvezioù klañvdi-iañ*), en ur lakaat kemm etre an diazeadurioù mezegel (Br. *kurdiou*) hag an diazeadurioù a zo dezho un amkan gwaredvezegel ha kedvuhezal evel *herberc'htioù an henaded amzalc'hiat*, HHA (Gl. *établissement d'hébergement des personnes âgées dépendantes*, EHPAD) (sl. *hospice*).

hoquet ◇ **hiccup, hiccough** ◇ **hik** g. -où Argrezadenn dasstrizhek a 'r gelc'hspereunn o tec'han ur stroñs er c'hof hag er brusk war un dro gant un trouz raoullet diwar strishadur an tarzh ha froum plegoù ar vouezh.

hormone ◇ **hormone** ◇ **hormon** g. -où Danvezenn dedaollet en un organ (gwagrenn enborc'hañ) ha dezoget gant red ar gwad betek un organ all pe ur gwiad (organ pe gwiad buk pe buzer) a fraoua pe a heud an diorren pe an arc'hwelañ anezho ; ent kimiek e ranner an hormonou e tri stroll : ar *stroll fenolek* (adrenalin, tiroksin), ar *stroll steroidel* (hormonou uslounezhel ha ganadel), ar *stroll proteek* (hormonou gougorf-ennel, ilgreizel, arskoedennel).

hormonogène ◇ **hormonopoeitic** ◇ **hormonbarañ, hormonbar** aa. O tedaoliñ un hormon.

hormonologie ◇ **hormonology** ◇ **hormonouriezh** b. Studi an hormonou.

hormonothérapie ◇ **hormonotherapy** ◇ **hormongurañ** Arver yac'hadel an hormonou.

Horniker : **syndrome de ~** ◇ **Horniker's syndrome** ◇ **azoniad Horniker** Kreizluc'hsaead gwazhiedandagel naous dre ur gouliñv er vrizhenn hag en dro-vrizhenn gant gouliñvoù bihan a-wechoù ; ganti e vez diaezet ar gweled, nemet e tedro alies etrezek ar pare ; war un dro ganti e stader peurliesañ dulaz ar bleñchoù gant andagoù an talmerennigoù ha strafuilhoù mieniñvek ha darfellek.

horripilation ◇ **horripilation** ◇ **hirisiñ** Sonnañ ar blev (houpigañ) stadet da geñver ar c'hridiennañ (sl. *chair de poule*).

hospice ◇ **home, old people's home** ◇ **boti** g. -où Diazeadur kedvuhezal pe gwaredvezegel evit herberc'hiañ an henaded pe an dud nammet amzalc'hiat.

NOTENN : Un arver istorel dreist holl zo hiziv da Gl. *hospice*, termen oc'h arouezin gwechall an ospitalioù (*hospices de Beaume*) ha diwezhatoc'h an diazeadurioù o herberc'hiañ an dud kozh pe ar glañvourion dibare (*hospice de Bicêtre*) ; dindan an anvad *boti* e renker, diouzh un tu, an tiez o tegemer tud kozh hepken (*tiez diwaz*, Gl. *maisons de retraite*), an HHA (Gl. EHPAD, sl. *hôpital rural*) hag ar c'hreizzennoù arbennik ma reer war-dro tud kreud- pe vrednammet ; kinniget eo bet reiñ an erdal ledanañ da Br. *herberc'hti* ha lakaat da isrummoù dezhañ ar *c'hurdiou* hag ar *botioù* (sl. La-09 201).

hospitalisation ◇ **hospitalisation** ◇ **1 herberc'hiañ, kurdiñ, klañvdiñ 2 ospitaliañ** 1 Darbenn en un diazeadur mezegel. 2 Darbenn en un ospital.

hospitalisation à domicile ◇ **home hospitalisation** ◇ **klañvdiñ er gêr** Prederiañ ar c'hlañvour en e gêr en doare ma ve graet en ospital, ur bare mezeion ha klañvdiourion o tont reoliek d'ober war e dro.

hospitalisation de jour ◇ **day hospitalisation** ◇ **deizospitaliañ** Mod herberc'hiañ aozet en doare ma teu ar gouziviad d'ar c'hlañvdi diouzh ar beure ha ma tistro d'e gêr bemnoz ; dereout a ra ouzh ar surjianerezh baleadel, kimigurañ ar yoc'hennou, an hemodializ, amc'hwil an uswask talmerel ; en deizospitalioù bredel ez endreder brednammidi stabilaet hag arbareaded 'zo.

hospitalisation sous contrainte ou sans consentement ◇ ◇ **ospitaliañ dre zestrizh pe ospitaliañ ec'hasant** Endredañ en ur bredospital, dre un disentez wirel diwar ali un pe lies bredvezeg, ur c'hlañvour diskleriet evel dañjerus evitañ e unan pe evit ar re all ; e Frañs, e tiforc'her an *ospitaliañ diwar c'houlenn un tredeour* (Gl. *hospitalisation à la demande d'un tiers*) pa na vez ket gouest ar bredklañvour da briziañ grevusted e stad (60 000 degouezh pep bloaz) hag an *ospitaliañ a berzh kefridi* (Gl. *hospitalisation d'office*) pa vez ar gouziviad en araez da argevezañ surentez an dud pe an urzh foran, ospitaliañ hemañ devedet gant ar prefed dre soliañ war un testeni mezegel (10 000 degouezh bep bloaz) ; d'an 22 Meurzh 2011, diwar c'houlenn an arlevier Nicolas Sarkozy, ez eus bet mouezhiet un erbar lezenn oc'h aotren, en tu all d'al lezenn gent, ar *prederioù baleadel dre zestrizh* (Gl. *soins ambulatoires sous contrainte*).

hospitalisme ◇ **1 hospitalism 2 contamination** ◇ **1 ospitalegezh b. 2 kurdiadezh b.** 1 Strafuilhoù kreud ha bred diwar an negez kantaezel bloc'hel o tizhout en 18 mizvezh kentañ eus o buhez bugale chomet pell amzer hep o mamm en ur c'hlañvdi : dilerc'hegezh vredloc'hadel ha lavarel, harzusted vihanoc'h ouzh ar poreoù, a-wechoù fallezh ha marv ; Spitz, a zeskrivas an azoniad, a lakae kemm etrezañ hag ar *gouvid gouskorel* (sl. *anaclitique : dépression ~, arriération affective : syndrome d'~*), diwar un diouer kantaezel darnel, ar maban o vezañ bet e piaou d'un darempred yac'h ouzh e vamm betek an oad a 6 miz da

nebeutañ, hag o pareañ peurliesañ ur wech adkavet e vamm. 2 Anvad lakaet nevez 'zo war ar poreoù dastumet en un diazevadur mezegele (sl. *communautaire, nosocomial*).

hospital-

• *centre hospitalier, hôpital général* ospital hollek • *centre hospitalier universitaire* ospital skolveurel • *centre post-hospitalier, centre de post-cure, centre de conva-lescence* kreizenn dianospitalel, tiez arbare • *hospitalisation de courte durée* herberc'hiañ pe klañvdiañ berbad • *hospitalisation de moyen, de long séjour* herberc'hiañ pe klañvdiañ krennbad, hirbad • *hospitalisation psychiatrique* bredospitaliañ.

hôte ◇ **host** ◇ **1 ostiz g. 2 danvevad g. -ed** 1 Bevedeg ma vez imboudet pe treuzplantet outañ ur gwiad, ur flugezenn, un organosod (sl. *bioartificiel*). 2 Bevedeg (loen pe struzhenn) o herberc'hiañ un arvevad (struzh, loen, bakteri, viruz); an *danvevad diwezhele* (Gl. *hôte définitif*) zo ennañ furm oadour, revek an arvevad, an *danvevad etreat* (Gl. *hôte intermédiaire*) ar furm larvel, anrevek, an *danvevad degouezhele* (Gl. *hôte accidentel*) a zegemer un arvevad "ezaouet" en ur spesad divoas.

Howell : temps de ~, temps de recalcification plasmatique ◇ **Howell's test** ◇ **amzer Howell, pad adrazeakaet ar plasma, prouad Howell** Pad ar c'haouediñ muzuliet war plasma ar gwad digouledusaet dre azdodiñ oksalat ha neuze adrazeakaet; par eo da sammad padoù an tromboplastin-furmiñ, an trombinfurmiñ hag ar fibrinfurmiñ; ent reol e vez gavaelet etre 2 ha 3 munud.

HR : espace ~, espace HV, espace HQ ◇ **HR interval** ◇ **esaou HR, esaou HV, esaou HQ** War ar c'halonvarrezad enkavennel kentez-kofig, hed etre ar wagenn H diwar vliavaat hordenn His hag ar wagenn V diwar vliavaat ar c'hofigoù (klotañ a ra ar wagenn V gant ar gwagennoù R pe Q er c'halonvarrezad gorre), hed o vezañ muzul pad ar ren his-kofig, hemañ o vezañ ent reol etre 35 ha 55 ms; an hiraat anezhañ a erzerc'ha ur mire e kefe pe e barroù hordenn His (sl. *conduction : troubles de la ~*).

Hughston : épreuve de ~ ◇ **Hughston's test** ◇ **prouad Hughston** Arouez gwedenn ar glin; ar gouziviad o vezañ gourvezet a-gein pe a-gostez, dalc'het e c'har war c'hwelañ diabarzh hag e droad war ezkamm, e c'houlanker ur plegañ-astenn ouzh ar c'har; pa vez un anaf er stagell e kroaz araok e verzhur un diskrog.

Huhner : test de ~ ◇ **Huhner's test** ◇ **prouad Huhner** Arnod graet pa vez gaonac'hded; 24 h goude ur gediadenn revel e rener un imbourc'h korrgreskerel war sklerenn gouzoug ar grozh war-benn studiañ ar spergelligoù, an niver, ar furm, an heloc'hded anezho.

huile toxique espagnole : syndrome de l'~ ◇ **Spanish toxic oil syndrome** ◇ **azoniad an eoul pistriek spagnat** Kleñved darreuziat darvezet e Spagn e 1981 e dianlen euvriñ eoul farlotet (eoul olivez mesket gant eoul kolza dinaturet dre an anilin); hemañ a zevoud un derzhienn hag anafoù gwazhiedfo strewek ha, da rouestladoù dezho, erzerc'hadoù trombozenfraouek o tedreñ etrezek ar fibroz; liesflugezel eo an anafoù : skeventel, avuel, kroc'henele, gwadel, nervgaherel (kaherostoù, isteñv, kridoù, krenezh) (sl. *éosinophilie-myalgies : syndrome ~*).

humage ◇ **inhaling** ◇ **rufañ** Dewentañ aezhenn pe burezhioù diwar dour melar pe dileizhennoù yac'hadel.

humérus ◇ **humerus** ◇ **paler g. -ioù** Askorn ar vrec'h, kenvellet e krec'h gant ar planken skoaz, en traoñ gant ar werzhid hag an helmo.

1 humeur 2 humeur, thymie ◇ **1 humo(u)r 2 mood, temper, thymia 1 dourenn b. 2 noa g.** 1 Dourenn a 'r bevedeg (nebeut arveret e vez an termen gallek, nemet er Gorfadurezh ma kaver termenoù evel *humeur aqueuse*, Br. *dourenn al lagad*). 2 Tued kantaezel bonel a zo e zurc'hadurioù kevenep pennañ al levenez hag an dristez; chomet eo arver Gl. *humeur* diwar al liamm a wele an aozerion gozh etre an noa ha dourennoù ar c'horf (sl. *galénisme*); dilerc'h an hevelep liamm a gaver ivez el lavar pemdeziek gant Br. *imor*.

humoral ◇ **humoral** ◇ **dourennel aa.** A-zave d'an dourennoù, sk. : *hangae dourennel* (Gl. *immunité humorale*) (sl. *immunité*).

NOTENN : Ne vez nepred arveret Gl. *humoral* er ster bredele; anv a reer eus *troubles de l'humeur* pe *troubles thymiques*. A du 'rall, mar gra aozerion 'zo gant Gl. *thymie, thymique*, e kaver peurliesañ an hanc'herioù-se e rezh stirannoù : Gl. *cyclothymie, hypothyrie, thymopathie*, h.a.

Hunt : maladies ou syndromes de Ramsay ~ ◇ **Ramsay Hunt's syndromes** ◇ **azoniadoù Ramsay Hunt** 1° Anvad all evit senkl an dremm; 2° anvad rumm evit azoniadoù dibaot a zic'henezhadur livennilpennel, hêrezhele alies, o tec'han kridoù, anezho : a) ar *migedal ilpennel pazennadek*, naouus dre gridoù delantek gant ar fiñvoù, kevret gant un azoniad ilpennel pe ilpennlivennel, gant damreolded an empennvarrezañ; b) ar *migedal ilpennel kridek*, naouus dre varradoù droukfell (erzerc'h en empennvarrezañ) heuliet gant kridoù emdarzh pe delantek gant ar fiñvoù ha strafuilhoù ilpennel, ha dre un dedro hir ha direolek; alies e vez an azoniadoù-se a-geñver gant un isteñv olivenn-ruz-ilpenn.

Hurler : maladie ou syndrome de ~, lipochondrodystrophie, gargoylisme ◇ **Hurler's disease** ◇ **kleñved Hurler, gargoulegezh b.** Anaev ganediged, familhel alies, oc'h erzerc'hañ e tro an oad a 2 pe 3 bloaz, naouus dre strafuilhoù e diorren an eskern, diwar anafoù talpennel, lies ha kemparzhiek : korreded, kloppenn ec'honek, fas distumm heñvel ouzh gargoulioù ar Grennamzer, rakwar kein-dargeiz gant baliregezh ar glerenn hag ar c'hof, izili berr ha harzek o loc'hañ, divlezh enkromm ha daoulin ezkromm, daouarn tuzum, bizied war bleg; usvent an avu hag ar felc'h, dilerc'hegezh ar bred, bouzarded, demerennoù ar gomsae, direzhoù ar gwad hag a-wechoù ar galon; dedro d'ar marv etre 6 ha 9 bloaz; kleñved renket e stroll ar mukopolisakaridozioù (rizh I-H); dec'hanele e vez gant divig un enzim, an 1^a-L-iduronidaz, treuzkaset dre hêrezh hervez ar mod aotozomek enkiliek (sl. *mucopeysaccharidose*).

hurlérien ◇ **hurloid** ◇ **hurlerel** aa. A-zave da gleñved Hurler.

Hutchinson : **dent de ~** ◇ **Hutchinson's tooth** ◇ **dant Hutchinson** Kammneuziad ar rakdent kreizer krec'h, anezhi ur grouzadenn gornloarek war ar ribl rez anezho, strishadur o farzh krec'h ha gwariadur o ahelioù kengerc'hus war draoñ; sellet e veze evel azonus d'ar sifiliz ganedigel.

Hutchinson : **faciès de ~** ◇ **Hutchinson's facies** ◇ **enebrezh g. Hutchinson** Arvez ar fas gant gouzviaded al lagadseizi gronnell, naouus dre ziloc'hded ar boullou lagad hag islink ar malvennoù pa glask ar c'hlañvour o sevel dre argrezañ e gigenn dal.

Hutchinson : **triade de ~** ◇ **Hutchinson's triad** ◇ **triadezh b. Hutchinson** Kevreted kammneuziadoù an dent (dant Hutchinson), anafoù lagad (kornsaefo parenkimatus) ha bouzarded pazennadek diwar dizhad ar milendall.

Hutchinson : **tumeur de ~** ◇ **Hutchinson's syndrome** ◇ **yoc'henn b. Hutchinson** Azoniad gant ar bugel diwar dassezioù askorn, oc'h erzerc'haat ur simpatom rizhellel eus ar vezonuslounehenn : laurioù en izili traoñ, terzhienn, amwad, ozvennoù kloppenn, bronduennoù ha gouliñv er malvennoù, eksoftalmoz (raklagadegzh yud).

hyaline ◇ **hyalin** ◇ **hialin** g. Danvezenn gwervanek diwar dic'henezhadur ar c'hollagen bezant e kleizennoù 'zo hag e-barzh speur talmerennigoù 'zo.

hyalinose ◇ **hyalinosis** ◇ **hialinoz** g. Disoc'h an treuzfurmatur e hialin eus danvezennoù kleñvedel 'zo.

hyalite ou **hyalitis** ◇ **hyalitis** ◇ **gweregfo** g. Tanijenn ar c'horf gwerek, anvad astennet alies da holl strafuilhoù ar c'horf gwerek.

hyaloplasma ◇ **hyaloplasma** ◇ **hialoplasma** g. Lodenn anlun hag unneuziek a 'r protoplasm.

hyaluronidase ◇ **hyaluronidase** ◇ **hialuronidaz** g. Enzim kavet en organoù 'zo (klidenn, felc'h, korael, kanevedenn) ha borc'h-et gant bakteri 'zo, en araez da zourannañ an drenkenn hialuronek (bezant er gwiad kenglenel, en iruzenn, h.a.) ha da verusaat al liñvennoù bevel, parenn deskignañ o tasperzhiañ en argerzhioù bevedel niverus, arveret ivez er yac'hadurezh (sl. *diffusion* : *facteur de ~*).

hybridation ◇ **hybridation** ◇ **hironiñ** Frouezhigiñ etre hiniennoù a spesadoù kevarall pe a seurtadoù kevarall eus an un spesad ; *hironiñ hilourel* (Gl. *hybridation génétique artificielle*), *askevosodiñ hilourel in vitro* pe *dazverañ hilourel* (Gl. *recombinaison génétique in vitro* pe *manipulation génétique*) a reer eus daskemmañ ur gellig vev dre ensoc'hañ un dafar hilel estren en he DNA (sl. *génétique* : *manipulation* ~).

hybride ◇ **hybrid** ◇ **hiron** aa. **2 hiron** g. -ed A-gent, hinienn evodet eus paradur kerent a spesadoù kevarall (mul, leporid); hiziv ez astenner an anvad da nep hinienn evodet eus paradurioù etre seurtadoù a 'n un spesad.

hybridité ◇ **hybridism** ◇ **hironded** b. Doare ur struzhenn pe ul loen disoc'het diouzh daou spesad kevarall.

hybridome ◇ **hybridoma** ◇ **hibidom** g. Unvez vev dewerc'het en imbourc'hva dre uniañ kromozomoù a spesadoù kevarall evit furmiñ kraoñelloù hiron o piouañ doareennoù hilel an daou spesad war un dro, da skouer dre uniañ limfokit logod ganer antikorfou gant kelligoù kankrek.

hyarthrose ◇ **hyarthrosis** ◇ **arzfoeñv** g. Fennad ul liñvenn levrus e kavenn ur c'henvell.

hydatide ◇ **hydatid** ◇ **hidatid** g. Larvenn pe c'hwezigen eus un tenia ekinokok, *Echinococcus granulosum*, a stader gant an den, dezhañ stumm ur bellenn vras pe vrasoc'h, leun gant ul liñvenn diliv.

hydatique ◇ **hydatie** ◇ **hidatek** aa. A-zave d'an hidatidoù, sk. : *ar c'hist hidatek* (Gl. *kyste hydatique*), furmadur ec'honek ha leun gant hidatidoù bihan, o sezañ alies en avu.

hydatidose ◇ **hydatidosis** ◇ **hidatidoz** g. Kleñved diwar an hidatidoù, bezant e-barzh ur c'hist (*kist hidatek*) e poent pe boent eus ar bevedeg, en avu, er skevent, er felc'h, h.a. (sl. *échinococose*).

hydatidothorax ◇ **bruskhidategzh** b. Fennad diwar fregadur ur c'hist hidatek er c'hrezoù.

hydaturie ◇ **hydaturia** ◇ **troazhhidategzh** b. Ec'hodiñ drailhenoù ur c'hist hidatek dre an troazh.

hydramnios ◇ **hydramnios** ◇ **amnionfoeñv** g. Reñver anreol eus al liñvenn amnionel (dreist 1 kg).

hydrargyrisme ◇ **mercurialism** ◇ **bevargantegzh** b. Teskad an erzerc'hadoù diwar ar pistriadir gant ar bevargant pe e gediadoù entoet er bevedeg dre euvriñ, dewentañ, ensinklañ pe arloañ kroc'henel (dispuilhadoù, livrezh anreol an amwiskadoù, h.a.), enskrivet evel kleñved micherel gant ar C'hedskor e Frañs.

hydratation ◇ **hydration** ◇ **1 dourvec'hiañ, amzourañ 2 asseviñ 3 dourgediañ** 1 Enteñv dour er bevedeg. 2 Er Wezeladouriezh, daskoriñ un neuz reol d'ar c'hroc'hen dre stourm ouzh an disec'hadur anezhañ diwar-bouez angevezhioù diseurt (koavonoù, dileizhennoù, livrizhennoù, h.a.). 3 Er Gimiezh, kengediañ ur molekoul dour hag ur c'horf all.

hydrémie ◇ **hydraemia** ◇ **1 dour-wadvec'h g. 2 dourwadusvec'h g.** 1 Feur an dour er gwad; anv a reer eus *dourwadvec'h kelligel* (Gl. *hydrémie cellulaire*), feur an dour en hemati, hag eus *dourwadvec'h plasmatek* (Gl. *hydrémie plasmatique*), feur an dour er plasma. 2 (Kemeradur en arver) feur reñverek an dour er gwad.

hydrécéphalique : **cri ~** ◇ **hydrecephalic cry** ◇ **leñv** g. **empennfoeñvel** Garm berr, lemm, unton a laosk hep abeg ar vugale tizhet gant ar pilhonfo torzhellek.

hydrécéphalocrinie ◇ **hydrecephalocrinia** ◇ **pennkeinorc'hañ** Tremen emborc'hadoù el liñvenn benn-kein.

hydro-électrolytique ◇ **hydroelectrolytic** ◇ **dourkevionel** aa. A-zave d'an dour ha d'ar c'hevionennoù er bevedeg.

hydro-hémarthrose ◇ **hydrohaemarthrosis** ◇ **gwadarzfoeñv** g. Fennad liñvenn levrus ha gwadek e-barzh kavenn ur c'henvell.

hydro-hématocèle ◇ **hydrohaematocele** ◇ **gwaddourvozhell** b. Seurtad gouinsaedevo ma c'hoarvez ar fennad ennañ a levruzenn wadek.

hydroa ◇ **hydroa** ◇ **hidroa** g. A-gent, nep dispuilhad c'hwezigennek; hiziv, termen a arverer gant un hogozenn da arouezñ lies anaez : 1) *hydroa gloevennek* (Gl. *hydroa bulleux*), arvez eus an eritem liesneuz (sl. *érythème polymorphe*), 2) *eritem hañvek* (Gl. *érythème estival*), furm skañv a 'n hidroa vaksinvanek, 3) *hydroa puerorum*, furm vugel eus kleñved Duhring-Brocq, 4) *hydroa vaksinvanek* (Gl. *hydroa vacciniiforme*), dispuilhad c'hwezigenburbuenn war un diaz tanijennek, o treiñ e gouliezoù linus ha trouskennoù azgell o lezel war o lerc'h kleizennoù gwenn trebadek, 5) *hydroa c'hwezigennek* (Gl. *hydroa vésiculeux*), furm a 'n eritem liesneuz, ar c'hwezigenburbuenn gentael o vezañ ur c'helc'hiad c'hwezigennoù war he zro.

hydrocarburisme ◇ **hydrocarbonism** ◇ **hidrokarbidennegezh** b. Strafuilhoù pistriel devoudet gant dewntadur an aezhennoù hidrokarbid-ennek hag ar burezhioù laosket gant ar strilheoulioù a orin meinel (benzin, tireoul, h.a.), gant steudad an aldehidoù hag aketonnoù aromatek, gant an terebentin hag an iradoù a orin struzhel, ha gant ar c'harbidennoù nitrojenek aromatek evel an anilin.

hydrocèle ◇ **hydrocele** ◇ **dourvozhell** b. Fennad levruzenn e-barzh ur c'houinsaer (*dourvozhell c'houinsaer*, Gl. *hydrocèle vaginale*) reol pe astennet dre ur ganol ampelenngouinsaer manet forzhnek en he fezh pe azarn (*dourvorzhell c'hanedigel*, Gl. *hydrocèle congénitale*); an anvad a lakaer ivez war ensiladur levrus gwiad kellaouek ar gousac'h (*dourvozhell ar gousac'h*, Gl. *hydrocèle des bourses*) pe, aleteñvel, war gistoù ar muzelloù bras (*dourvozhell venevel*, Gl. *hydrocèle de la femme*).

hydrocéphale ◇ **hydrocephalic** ◇ **1 empennfoeñvek** aa. **2 empennfoeñveg** g. **-eion** **3 empennfoeñvel** aa. 1 Gant an empennfoeñv. 2 Gouziviad an empennfoeñv. 3 A-zave d'an empennfoeñv.

hydrocéphalie, **hydrencéphalie** ◇ **hydrocephalia**, **hydrocephalus** ◇ **empennfoeñv** g. Fennad liñvenn levrus e kavenn kambroù an empenn (*empennfoeñv diabarzh* pe *empennfoeñv ar c'hambroù*), pe e-maez an empenn etre ar pilhonenoù (*empennfoeñv diavaez*), o vuiaat a-wechoù ec'honad ar c'hlopenn; en devoud, hiziv, ez arouez an termen an empennfoeñvoù diabarzh, eleze arledadur ar c'hambroù gant reñver al liñvenn, kentael pe eilvedel d'ur skoilh ouzh amred hag assugadur al liñvenn benn-kein; *empennfoeñv henek an oadour*, gant gwask reol, a zec'han strafuilhoù ar c'herzhed hag ar c'helc'hstrishaerioù, ha direzhioù kfredel, en ervez da argizañ dre an amdreugañ kamb-ampelenn (sl. *dérivation du liquide céphalorachidien dans l'hydrocéphalie*).

hydrocholécyste ◇ **hydrocholecystis** ◇ **bestlgellennfoeñv** b. Bolc'hadur a-vras ar gellenn vestl hep tanijenn, diwar ur skoilh war diver ar vestl.

hydrocolpos ◇ **hydrocolpos** ◇ **gouinfoeñv** g. Daspugnad liñvenn enkistet e-barzh ar gouin.

hydrocution ◇ ◇ **dourgeuziañ** Ezwal o tarvezout trumm e-kerz ur gouronkadenn yen o tevoudañ beuzadenn an neuñver dre an angwent, alese livrezh gwenn ha neuze glas ar beuzed; ur wikefre dreuzempennel zo d'an dourgeuziañ, evel d'an tredangeuziañ ha da angwentoù trumm 'zo, gwrezverk an dour o vezañ an delanter pennañ; beuzadennoù dre zourgeuziañ eo e gwir ar beuzadennoù a lavarer "dre zarwazh" (Gl. *par congestion*).

hydrocystome ◇ **hydrokystoma** ◇ **hidrokistom** g. Kist bihan ezkroc'henele leun gant ul levruzenn voull o sezañ war an dremm peurliesañ.

hydrogénation ◇ **hydrogenation** ◇ **hidrogenañ** Lenañ hidrogen ouzh ur molekul.

hydrokinésithérapie ◇ **hydrokinesitherapy** ◇ **dourleuñvouriezh** b. Leuñvouriezh renet e-barzh dour, en ul lenn neuñvin da skouer.

hydrolase ◇ **hydrolase** ◇ **hidrolaz** g. Enzim o tevoudañ an dourannañ, sk. : lipaz, amilaz, pepsin, fosfataz, h.a.

hydrolat ◇ ◇ **dourstrilhad** g. Lia dewerc'het dre strilhañ gant dour un danvez a zo ennañ gwezhuzennoù.

hydrolé ◇ ◇ **dourleizhad** g. Lia o c'hoarvezout a zanvezennoù gwezhus dileizhet en dour.

hydrologie médicale ◇ **medical hydrology** ◇ **douriaouriezh** b. **vezegel** Studi ar spesadoù diseurt dour naturel pe galvezadel e diarsell o ferzhioù yac'hadel.

hydrolyse ◇ **hydrolysis** ◇ **1 dourlenañ** **2 dourannañ** 1 Lenañ ur molekul dour ouzh un danvezenn, ouzh he zreuzfurmiñ en un danvezenn all, sk. : enaozañ ar glukoz dre zourlenañ ar glikogen. 2 Dazgwered kimiek dec'hanet gant an ion H⁺ pe OH⁻ eus an dour; klok e c'hell bezañ an dourannañ, sk. : ec'haoz ar garbidenn galkiom ha dilaosk aketilen, pe darnel, sk. : gant halioù trenkennoù pe bazennoù gwan.

hydromassage ◇ **hydromassage** ◇ **dourverata** Merata dre araez ur strinkadenn pe ur bomm dour.

hydromètre, **hydrométrie** ◇ **hydrometra** ◇ **krozhfoeñv** g. Daspugnad levruzenn e-barzh ar grozh.

hydrominéral ◇ ◇ **havel** aa. A-zave d'un dour melar (sl. *eau minérale*).

hydromyélie ◇ **hydromyelia** ◇ **melfoeñv** g. A-gent, anvad a roed d'an holl enloezadoù eus ar mel a-livenn, ganedigel pe get, ar c'havnelad en o zouez; hiziv ne dalvez nemet bolc'hadur kanol greiz ar mel (a-gevenep d'an empennfoeñv) (sl. *hydrocéphalie*).

- hydronéphrose** ◇ **hydronephrosis** ◇ **lounezhfoeñv** g. Dardennañ lestr al lounezh, ar c'haliroù hag, alies ivez, al lounezh, dre un daspugnad troazh anlestek, harzet an diver anezhañ gant ur skoilh padek pe dibad, pe gant un diouer tantañ pe loc'hañ eus al lestr.
- hydropénie** ◇ **hydropenia** ◇ **dourisvec'h** g. Feur dour re izel er bevedeg.
- hydropéricarde** ◇ **hydropericardium** ◇ **amgalonnenfoeñv** g. Fennad levrzenn e-barzh an amgalonenn.
- hydropexie** ◇ **hydropexis** ◇ **dourlenañ** Lenañ dour e-barzh gwiadoù ar bevedeg.
- hydrophilie** ◇ **hydrophilia** ◇ **dourlended** b. Er fizik-kimiezh, perzh ar c'holloidoù da zedennañ ha da zerc'hel an dour gant ur nerzh bras pe vrasoc'h.
- hydrophobie** ◇ **hydrophobia** ◇ **1 dourarur** g. **2 dourgaz** g. **3 dourlezzed** b. 1. Amgren neurozek rak an dour. 2 Aon disol rak an dour, anvad all ar gonnar, ez eo an dourgaz un azon anezhi. 3 Er fizik-kimiezh, perzh korfoù 'zo da argas an dour.
- hydroptalmie** ◇ **hydroptalmia** ◇ **lagadfoeñv** Muiadur ec'honad meteier al lagad, oc'h ober dardennañ d'ar goloioù anezhañ, anaez ar vugale, ganedigel a-wechoù (sl. *buphtalmie, glaucome*).
- hydropigène** ◇ **hydropigenous** ◇ **foeñveiat** aa. O tevoudañ ar foeñv.
- hydropisie, hydrops** ◇ **dropsy** ◇ **foeñv** g. Fennad levrzenn en ur gavenn naturel eus ar c'horf pe etre elfennoù ar gwiaid kenglenel.
- hydropneumatocèle** ◇ **hydropneumatocele** ◇ **douraezhvozhell** b., **douraezhogad** g. Avelenn a zo enni liñvenn hag aezhenn.
- hydropneumopéricarde** ◇ **hydropneumopericardium** ◇ **amgalonnenndouraezhad** g. Fennad aezhenn ha liñvenn e-barzh an amgalonenn; erzerc'h eo dre ur flokata, an *trouze milin* (Gl. *bruit de moulin*) (sl. *clapotage*).
- hydropneumothorax** ◇ **hydropneumothorax** ◇ **bruskdouraezhad** g. Fennad aezhenn e-barzh kavenn ar c'hrezoù, kevret gant ur fennad levrus pe linus.
- hydrorragie** ◇ ◇ **dourliñvañ** Tremen an dour eus plasma ar gwad etrezek an esaouennoù entremezel, a stader da geñver bleuzioù 'zo.
- hydrorrhée** ◇ **hydrorrhoea** ◇ **dournaouez** b. Diver levrus puilh diwar ur glaourgenn foek (kroz, kevresae, h.a.); diforc'hiñ a ranker *a) dournaouez ar fri pe frinaouez, friver* (Gl. *hydrorrhée nasale, rhinorrhée*), anezhi usvorc'hañ glaourgenn kavenn ar fri, *b) an dournaouez empenn-mel* (Gl. *craniohydrorrhée, hydrorrhée cérébrospinale*), *c) dournaouez ar godoù* (Gl. *sinusohydrorrhée, d) sifern ar bleuñv* (sl. *coryza spasmodique, craniorrhée*).
- hydrosalpinx** ◇ **hydrosalpinx** ◇ **korzennfoeñv** g. Dastumad levrzenn enkistet e-barzh ur gorzenn a 'r grozh.
- hydrosodique : rétionen** ~ ◇ **hydrosodic retention** ◇ **azdalc'h** g. **dournatriom** Reñver dour ha natriom er bevedeg.
- hydrothérapie** ◇ **hydrotherapy** ◇ **dourgurañ** Arver yac'hadel an dour e pep stumm hag e lies gwrezverk : kouronkoù, strinkadennoù dour pe vurezh, c'hwezadennoù e-barzh stoufailhoù sec'h pe c'hleborek (saona), dourverata, neuñviñ, h.a. (sl. *bain, balnéothérapie, crénothérapie, douche, eau minérale, étuve, hydromassage, kinébalnéo-thérapie, sauna, thalassothérapie, thermalisme*).
- hydrothorax** ◇ **hydrothorax** ◇ **bruskdourad** g. Fennad levrus e-barzh kavenn ar c'hrezoù, gwech untu, gwech daoudu, hep erwezh foel, kevret alies gant gouliñvoù all hag o tarvezout en anaezioù kalon pe lounezh 'zo.
- hydrotimétrie** ◇ **hydrotimetry** ◇ **dourandalañ** Araezad amkanet da andalañ talvoud yec'hedel pe greantel un dour dre vuzuliañ feur an halioù meinel (kalkiom ha magnezium pergen) a zo ennañ, eleze an derez garvder anezhañ (sl. *eau adoucie*).
- hydroxocobalamine** ◇ **hydroxocobalamin** ◇ **hidroksokobalamin** g. Deverad diwar ar c'hobalamin ma 'z eo erreet ar c'hobalamin ouzh ur bonad OH, anezhañ un askenad eus ar vitamin B₁₂ (sl. *cobalamine*).
- hydruretère** ◇ **hydroureter** ◇ **sandroazhfoeñv** g. Dardennañ ar san droazh dre un daspugnad troazh anlestek, harzet an diver anezhañ gant ur skoilh.
- hydrurie** ◇ **hydruria** ◇ **dourdroazhusvec'h** Troazh sklaer, a zouester izel, diwar ar reñver dour ennañ.
- hygiène** ◇ **hygiene** ◇ **Yec'hedouriezh** b. 1 Skourr a 'r Vezekniezh o studiañ an araezioù da zerc'hel an den er yec'hed mat dre e wareziñ ouzh ar c'hleñvedoù. 2 Termen kemeret hiziv en un erdal ledanoc'h : hollad ar parennoù hiniennel, kevredigezhel, riezal hag eteriezel o kevaraezañ an den da zerc'hel e gempouez korfel, breidel ha buhezal.
- hygiénique** ◇ **hygienic** ◇ **1 yec'hedus** **2 yec'hedourel** aa., **yec'hedel** aa. 1 O kevaraezañ da zerc'hel ar yec'hed. 2 A-zave d'ar Yec'hedouriezh.
- hygroma** ◇ **hygroma** ◇ **higroma** g. Anv spesadel ar seurtadoù tanienn a 'r yalc'hoù irus (sl. *bourse séreuse*); *higroma al lounezh* : fennad troazh etre al lounezh hag ar pourc'had anezhi.
- hylognosie** ◇ **hylognosia** ◇ **danvezdenaoud** g., **denaoud an danveziou** Galloud da hennadiñ danvez an traoù dre ar stekiñ (sl. *agnosie*).
- hymen** ◇ **hymen** ◇ **lienenn** b. **gourzh** Kennenn glaourgennek o tispartiañ gant ar vaouez werc'h ar rakkambri diouzh kavenn ar gouin; freget e vez da geñver ar geventrac'h kentañ.

- hyoïde, os hyoïde** ◇ **hyoid, hyoid bone** ◇ **askorn g. uheñvel** Askorn stumm U loet e parzh araok-krec'h ar gouzoug.
- hyperacanthose** ◇ **hyperacanthosis** ◇ **hiperakantoz g.** Usteñv gwelead Malpighi an ezkroc'hen, stadet er struzhennoù gwenerel hag er papillhomoù.
- hyperacousie** ◇ **hyperacusis** ◇ **1 usklev g. 2 stenuc'h-anglev g.** 1 Reñver eraezñ ar stenioù, reoù anezho o vezañ laurus, en talmoù uhel pergen. 2 Anglevad reñverek ar stenioù hep ma ve daskemmet al lemmded kleved (sl. *anacousie, hypoacousie*).
- hyperactivité avec troubles de l'attention chez l'enfant (THADA)** ◇ **attention deficit hyperactivity disorder (ADHD)** ◇ **usniñv-isevezh (ar vugale) (UNIE)** Realezh usniñvek, strafuilhoù an evezh ha darluskegezh a stader gant ar baotred dreist holl, a vezeger peurliesañ dre araez ar bredfraouerioù.
- hyperalbuminémie** ◇ **hyperalbuminaemia** ◇ **gwadusvec'h g. albumin, albuminwadusvec'h g.** Feur reñverek an albumin e-barzh plasma ar gwad (sl. *albuminémie*).
- hyperaldostéronisme** ◇ **hyperaldosteronism** ◇ **uc'haldosteronegezh b.** Reñver paridigezh an aldosteron gant ar gaenus-lounezhen o tevoudañ reñver ezvevennañ ar c'haliom, azdalc'h an natriom, un alkaloz kennevidel hag ar strafuilhoù o tisoc'h anezhañ.
- hyperaldostéronurie** ◇ **hyperaldosteronuria** ◇ **troazhvec'h g. aldosteron, aldosteronwadusvec'h g.** Reñver an aldosteron en troazh.
- hyperalgie, hyperalgésie** ◇ **hyperalgia, hyperalgisia** ◇ **usgost g.** Reñver ar gizidigezh ouzh al laur (sl. *analgésie*).
- hyperandrogénie, hyperandrogénisme** ◇ **hyperandrogenism** ◇ **androgenusvec'h g., uc'handrogenegezh b.** Reñver an hormonou gourevus (androgenoù) er bevedeg; gant ar vaouez, e tevoud dinodadur ar c'hourevezegzh (sl. *androgène : hormones ~s, andro-génie, hypoandrogénie, virilissant, virilisme*).
- hyperazotémie, azotémie** ◇ **hyperazotaemia** ◇ **gwadusvec'h g. urea, ureawadusvec'h g.** Feur reñverek an urea er gwadvez (sl. *azotémie, urémie*).
- hyperazoturie, azoturie** ◇ **hyperazoturia** ◇ **1 troazhusvec'h g. nitrogen, nitrogendroazhusvec'h g. 2 troazhusvec'h g. urea, ureadroazhusvec'h g.** 1 Feur reñverek nitrogen en troazh. 2 Feur reñverek urea en troazh (sl. *azo-turie, hypoazoturie*).
- hyperbare, hyperbarique** ◇ **hyperbaric** ◇ **uc'hamwask aa.** Dindan amwask uhel, da skouer pa reer kel eus ar gwask e-barzh al lec'hioù kloz m'emañ ar bevedeg, evel ar c'haelogoù (sl. *caissons : maladie des ~, oxygénothérapie, hypobare*).
- hyperbarie, hyperbarisme** ◇ **hyperbarism** ◇ **uc'hamwask g.** Uheladur an amwask (sl. *oxygénothérapie*).
- hypercalcémiant** ◇ **kalkiomwadvec'hiaus aa.** O vuiaat feur ar c'halkiom er gwad.
- hypercalcémie** ◇ **hypercalcaemia** ◇ **gwadusvec'h g. kalkiom, kalkiomwadusvec'h g.** Feur reñverek ar c'halkiom er gwad, a stader e kleñvedoù an askornloezañ, er c'halkiomussug (usvitaminegezh D) hag en azoniad laezhalkalie; azonet e vez gant an anilboued, ar welved, an treutadur, an asikted, an istantegezh, ar c'hweladoù hag an diabet heuz (sl. *lait et des alcalins : syndrome du ~*).
- hypercalcémie provoquée : épreuve d'~** ◇ **calcium infusion test** ◇ **prouad ar c'halkiomvec'hiañ** Studi argemmadoù ar c'halkiomwadvec'h goude ensinklañ engwazhiennel herrek 0,8 mL/kg eus un dileizhenn glukonat kalkiom da 10 %; ent reol, 15 min goude an ensinkladenn e sav ar gwadvec'h kalkiom da 125 mg/L ha diskenn d'ar feur reol (100 mg/L) goude 2h30; dre ar prouad-mañ ez imboure her gousted ar bevedeg da herzel ouzh ar gwadusvec'h kalkiom, peurgetket da vorc'hañ ar c'halkitonin; peurliesañ e vez hiraet krommenn ar gwadvec'h e kleñvedoù ar skoedenn (ar pennsac'h eeun, ar skoedusvorc'h ha dreist holl ar skoedisvorc'h) oc'h erzerc'haat skorted borc'hañ ar c'halkitonin (sl. *calcitonine*).
- hypercalcie** ◇ **kalkiomusvec'hiegezh b.** Teskad ar strafuilhoù devoudet gant reñver ar feur kalkiom er bevedeg.
- hypercalcifiant** ◇ **usrazekaus aa.** O vuiaat lenañ ar c'halkiom er bevedeg.
- hypercalciurie** ◇ **hypercalciuria** ◇ **troazhusvec'h g. kalkiom, kalkiomdroazhusvec'h g.** Ezvevennañ reñverek kalkiom dre an troazh, stadet dreist holl en osteoporoz, en arskoedusvorc'h, en usvec'hiegezh vitamin D (*usvitaminegezh D*), en azoniad laezhalkalie; prouad ar c'halkiomdroazhvec'hiañ (Gl. *épreuve de l'hypercalciurie provoquée*) a c'hoarvez a studiañ krommenn an ezvevennañ goude ensinklañ gwazhiennel kalkiom : ar reñver ezvevennañ a erzerc'ha un hiperosteoidoz, an diouer un hypoosteoidoz (sl. *hyperostéïdose, hypo-ostéïdose*).
- hypercapnie** ◇ **hypercapnia** ◇ **karboisvec'h g.** Reñver ar CO₂ dileizhet e plasma ar gwad (ma revez e rezh trenkenn garbonek dreist holl), e dianlen un iswentañ skeventel; mar degouezh trumm e tevoud an akidoz aezhel; mar bez henek, e vez kevassavet gant ur wikefre arouleviañ lounezhel o vuiaat feur bikarbonatoù ar plasma (sl. *capnie*).
- hyperchlorémie** ◇ **hyperchloraemia** ◇ **gwadusvec'h klor g., klorwadusvec'h g.** Reñver ar c'hementad klor e plasma ar gwad, oc'h erzerc'haat ur strafuilh eus ar c'hempouez trenkenn-bazenn (akidoz kennevidel, alkaloz aezhel) pe ur wadusvec'h natriom (sl. *chlorémie*).
- hyperchlorhydrie** ◇ **hyperchlorhydria** ◇ **usklorhidregezh b.** Reñver trenkenn glorhidrek er sug kreuz, erzerc'h dre laurioù e dibenn ar c'hoazhadennoù, distreizhadoù, c'hweladoù a-wechoù ha gorrekaat c'hwel ar c'hoaz-hañ.
- hyperchloruration** ◇ **hyperchloruration** ◇ **uskloridennegezh b., kloridennusvec'h** Reñver ar c'hloridennoù (kloridenn natriom dreist holl) er bevedeg.

- hyperchlorurie** ◇ **hyperchloruria** ◇ **troazhusvec'h g. kloridennoù** Reñver kloridennoù ezvevnet dre al louezh.
- hypercholémie** ◇ **hypercholaemia** ◇ **bestwodusvec'h g.** Reñver livegennoù bestel er gwadvez.
- hypercholestérolémie** ◇ **hypercholesterolaemia** ◇ **gwodusvec'h g. kolesterol, kolesterolwodusvec'h g.** Reñver kolesterol er gwad (dreist 2,5 g/l, 6 mmol/l) a stader dreist holl er gwodusvec'h lipid, er rizh II anezho pergen ma sav ar c'holesterol dreist 5 g/l; emañ e dalc'h muiadur ar β-lipoproteinou : boull eo ar gwadvez, a-vec'h uhelaet feur an triglikéridoù; boas eo ar gwodusvec'h kolesterol er miksedem, en iktér dre steviañ, en nefroz lipidel; kentael e vez a-wechoù, er c'holesterolwodusvec'h hennadek pe *familhel* (sl. *hyperlipidémie, xan-thomatoze hypercholestérolémieque familiale*).
- hypercholie** ◇ **hypercholia** ◇ **bestlusvorc'h g.** Muiadur borc'hañ ar vestl.
- hyperchromie** ◇ **hyperchromia** ◇ **1 uslivegad g., uslivegadegezh b. 2 usliveded** 1 Anvad genadel ar reñverioù livegadur ar c'hroc'hen : lentigo, efelidoù, kloasma, melanoderma. 2 Arveret a-wechoù evel kenster da amwad uslivel (sl. *anémie hyperchromie*).
- 1 2 hypercinésie, hyperkinésie 3 hyperkinésie, excitation motrice** ◇ **hyperkinesia** ◇ **1 usfiñv g., usfiñvegezh b. 2 glizi s. 3. trefiñv g.** 1 Muiat ampled ha buanded ar fiñvoù : korea, atetoz, ballegezh, krenerezh, midantoù, ha hiziv dreist holl, dre vras, fiñvoù andiarvenn 'zo e-maez eus an azoniadoù-se, evel an usfiñvegezh delanket gant an neurolepteur, houmañ o kemer peurliesañ furm ar *mifiñv ampellat* (sl. *dyskinésie tardive*); arveret en amiegouriezh da arouezañ ar reñver en o aliested hag en o c'hreñvder eus argrezadoù ar grozh e-kerz ar gwentloù. 2 Arveret ivez a-wechoù evel kenster da Gl. *convulsion* (sl. 2. *convulsions*). 3 Gant aozerion 'zo e vez anvet Gl. *hyperkinésie* ur furm eus ar vroudedigezh, anezhi un usfiñv bred oc'h anañ e rezh ar c'hefrou loc'hadel dreist holl (sl. *excitation*).
- hypercitricémie** ◇ **hypercitricaemia** ◇ **kitrekwodusvec'h g.** Muiat feur an drenkenn gitrek er gwad (dreist 27 mg/l gwadvez).
- hypercoagulabilité** ◇ **hypercoagulability** ◇ **uskaouledusted b.** Reñver araezusted ar gwad da gaouledañ, andalet dre vuzuliañ buanez ar c'haouledañ diwar-bouez prouad ar c'hougemerusted ouzh an heparin *in vitro* (sl. *coagulabilité, hypocoagulabilité, isocoagulabilité*).
- hypercoagulant** ◇ **hypercoagulant** ◇ **1 uskaouledus aa. 2 uskaouleder aa. 3 uskaouleder g. -ioù** 1 (Gwad) gant ar perzh uskaouledañ. 2 (gwezher) o tec'han an uskaouledañ. 3 Danvezenn o tec'han an uskaouledañ (sl. *coagulant*).
- hypercoagulation** ◇ **hypercoagulation** ◇ **uskaouledañ** Reñver kaouledañ (sl. *coagulation, coagulation vasculaire disséminée : syndrome de ~*).
- hypercomplémentémie** ◇ **hypercomplementaemia** ◇ **gwodusvec'h g. klokaenn, klokaennwodusvec'h g.** Muiat feur ar glokaenn er gwad (sl. *complément, complémentémie*).
- hypercorticisme** ◇ **hypercorticism** ◇ **kaenusvorc'h g., kaenusvorc'hegezh b.** Reñver borc'hañ gant ar gaenuslouezhenn hag ar strafuilhoù o tarvezout da heul; hervez an hormonou borc'het e tiforc'her tri rizh *k. : 1) k. kennevidel* pe *k. glikokorticoidel* (sl. *Cushing : maladie de—*), 2) *k. androgenel* (sl. *génitosurrénal : syndrome ~*), 3) *k. mineralotropel* (sl. *hyperaldosté-ronisme*).
- hypercortisolisme** ◇ **hypercortisolism** ◇ **kortizolusvorc'h g., kortizolusvorc'hegezh b.** Seurtad kaenusvorc'h ma vez muiet borc'hañ ar c'hortizol (hidrokortizon).
- hypercréatinurie** ◇ **hypercreatinuria** ◇ **troazhusvec'h kreatin g., kreatintroazhusvec'h g.** Reñver ezvevennañ ar c'hreatin en troazh.
- hypercrinie** ◇ **hypercrinia** ◇ **usvorc'h g.** Reñver ar borc'hañ gant pe hep daralladur an danvezenn borc'het.
- hypercyphose** ◇ **hyperkyphosis** ◇ **gourrakwar g.** Derez uc'hek ar rakkwar.
- hyperémotivité** ◇ **hyperemotivity** ◇ **gourfromidigezh b.** Derez uc'hek ar fromidigezh (sl. *émotivité*).
- hyperendophasie** ◇ **hyperendophasia** ◇ **gourderc'hluzañ** Derez eizhañ an derc'hluzañ, sellet evel kleñvedel ha lodek en azoniad an *darc'hwelerezh bred* (sl. *automatisme mental, endophasie*).
- hyperergie, hyperallergie** ◇ **hyperergia** ◇ **hiperergiezh, hiperallergiezh** Furm uc'hek an erwezhañ allergek (sl. *allergie, hypoergie*).
- hyperesthésie** ◇ **hyperaesthesia** ◇ **uc'heraez g.** Muiadur an eraezañ en eil pe eben eus e furmoù.
- hyperfibrinémie** ◇ **hyperfibrinaemia** ◇ **gwodusvec'h g. fibrin, fibrinwodusvec'h g.** Reñver feur ar fibrin er gwad ezwazhiet ha kaouledet (6 da 12 g/l); e stadañ a reer e-kerz ar skeventfo ha remm lemm an arzoù.
- hypergammaglobulinémie** ◇ **hypergammaglobulinaemia** ◇ **gwodusvec'h g. γ-globulin, γ-globulinwodusvec'h g.** Reñver feur γ-globulinou ar gwadvez; termen arveret alies evel kenster da *globulinwodusvec'h* (sl. *globulinémie, hyperglobulinémie*).
- hypergenèse** ◇ **hypergenesis** ◇ **uspar g., uswe g.** Reñver neriñ kelligoù un organ, ur gwiad pe un nevezwe (sl. *hyperplasie*).
- hypergénitalisme** ◇ **hypergenitalism** ◇ **usganadegezh b.** Reñver enborc'hañ ganadel; erzerc'h ent klinikel dre usvent ar glidenn pe ar vierrez (sl. *hypogénitalisme, hyperorchidie, hyperovarie*).
- hyperglobulinémie** ◇ **hyperglobulinaemia** ◇ **gwodusvec'h g. globulin, globulinwodusvec'h g.** Reñver feur ar globulinou er gwadvez : pe an holl seurtadoù anezho, an holl ac'hadoù (*klonoù*) kelligoù borc'her o vezañ uswezhus (ar *g. poliklonel* eo),

pe un pe daou seurtad anezho e dianlen uswezusted un pe zaou glon hepken (g. *monoklonel* pe g. *biklonel*); peurliesañ ez eus un *immunoglobulin* eus ar seurtad reñverek; komz a reer ivez eus *globulinwadvice* 'hioù *monoklonel*, *biklonel*, *poliklonel* (sl. *dysglobulinémie*).

hyperglycémiant ◇ **hyperglycaemic** ◇ **glukozwadusvec'h**ius aa. O vuiaat feur ar glukoz er gwad.

hyperglycémie ◇ **hyperglycaemia** ◇ **gwadusvec'h glukoz** g., **glukozwadusvec'h** g. Reñver feur ar glukoz er gwad; e stadañ a reer ent tremeniat goude ar predoù dre zelanvad danvezennoù evel an adrenalin, e stadoù kleñvedel 'zo (terzhienn, skoedusvorc'h ha dreist holl diabet); sellout a reer evel gwadusvec'hiek ar feurioù dreist 1,40 g/l (7,8 mmol/l); e 1999 e voe merket gant ABY (*Aozadur Bed ar Yec'hed*) feur uc'hek gwadvec'h reol ar glukoz da 1,26 g/l (7 mmol/l).

hyperglycémie provoquée : **épreuve de l'~**, **test de tolérance au glucose** ◇ **glucose tolerance test** ◇ **prouad** g. ar **glukozwadvec'hiañ**, **prouad ar glukozvec'hiañ**, **prouad gougomer ar glukoz** Dezventadurioù daskoulzet ar glukoz er gwad goude ebarzhiñ (dre euvriñ pe dre sankañ engwazhiennel) ur c'hementad glukoz lavaret; gant an diabeteg e vez brasoc'h ha padusoc'h muiadur ar glukozwadvec'h (hemañ dreist 2 g/l goude euvriñ 75 g glukoz); soliusoc'h eo hent ar wazhienn pa dremen hebiou da ziasurderioù ar c'hoaz-hañ.

hyperglycémique : **syndrome** ~ ◇ **hyperglycaemic syndrome** ◇ **azoniad glukozwadusvec'hiadel** Teskad azonou diwar yoc'hadur ar glukoz er gwad hag er gwiadou : gwadusvec'h ha troazhusvec'h glukoz, ustroazh, goursec'hed, gournaon, treutadur hag asiked — arouezioù an diabet c'hwek.

hyperglycinurie ◇ **hyperglycinuria** ◇ **troazhusvec'h** g. **glikin**, **glikindroazhusvec'h** g. Bezañs a-vras ar glikin en troazh, arouez vevoniel pennañ ur c'hleñved enzymatek hêrezhel (ar *glikinoz*) diwar migennevid an amidrenkenn-se; erzerc'hañ a ra gant ar maban dre strafuilhoù koazhadel, un akidoz ha direizhoù en empenn hag er gwad (olgwenn neutrofil, olpladanoù ha tuadur d'ar poreoù); devoudet eo gant un diouer bevec'haozañ ar glikin, hemañ o yoc'hañ er gwad (*glikinwadusvec'h*) hag o vezañ ezvevennet dre an troazh (sl. *glycine, glycinurie*).

hyperglycistie ◇ **hyperglycistia** ◇ **gwiadusvec'h** g. **glukoz**, **glukozwiadusvec'h** g. Yoc'hadur ar glukoz er gwiadou, a stader gant an diabeiteon.

hyperglycorachie ◇ **hyperglycorrhachia** ◇ **keinusvec'h** g. **glukoz**, **glukozkeinusvec'h** g. Muiadur feur ar glukoz el liñvenn benn-kein, stadet en empennfo darreuziat hag er senkl.

hypergueusie ◇ **hypergeusia** ◇ **ustañva** g. Reñver kizidigezh skiantenn an tañva (sl. *agueusie, hypogueusie*).

hypergynisme ◇ ◇ **usvenevegezh** b. Reñver an arouezioù revel gant ar vaouez.

hyperhidrose ◇ **hyperhidrosis** ◇ **c'hwezusvorc'h** g. Reñver ar borc'hañ c'hwez (sl. *anhidrose, hypohidrose*).

hyperhydratation cellulaire : **syndrome d'~** ◇ **cellular hyperhydration syndrome** ◇ **azoniad an dourusvec'h kelligel** Teskad an azonou eilvedel d'an isgrenn ezkelligel (sl. *hypotonie osmotique du plasma* : *syndrome d'~*); darvezout a ra a-wechoù hep isgrenn ar plasma diwar vuiaat enaoz an dour e-barzh ar c'helligoù (terzhiennnoù hirbad, negeziou).

hyperhydratation extracellulaire : **syndrome d'~** ◇ **extracellular hyperhydration syndrome** ◇ **azoniad an dourusvec'h ezkelligel** Azoniad naouus ent vevoniel dre usvec'h an natriom el liñvennoù ezkelligel gant azdalc'h dour, grenn ar plasma o chom reol; kantet emañ ar reñver dour ha haliou en esaoennou entremezel hag erzerc'haet dre muiadur ar pouez korf hag ur gouliñv; devoudet e c'hell bezañ gant ur bloueigfo, ur skorted kalon pe ur proteinwadusvec'h; prederiet e vez dre leiaat ar c'hemer ha muiaat an ezvevennañ natriom.

hyperhydratation extracellulaire avec déshydratation cellulaire : **syndrome d'~** ◇ ◇ **azoniad dourusvec'h ezkelligel ha dourusvec'h kelligel** Azoniad o kevredañ, er c'hombod enkelligel, un azdalc'h natriom hag un azdalc'h dour bihanoc'h a-genfeur; ent klinikel, emañ erzerc'haet an dourusvec'h ezkelligel dre c'houlifvoù hag an dourusvec'h kelligel dre sec'hded an teod, an itik, an derzhienn, ar c'hefroù hag a-wechoù ar morgud; azoniad o tarvezout er broezioù tomm gant ar c'houlifveion (kleñvion kalon, lounezh pe avu) oc'h ezvevennañ an dour dre o c'hroc'hen hep ezvevennañ reñver an hollen; prederiet e vez dre ziounit dour.

hyperhydratation globale : **syndrome d'~** ◇ **total hyperhydration syndrome** ◇ **azoniad an dourusvec'h hollel** Azoniad o kevredañ arouezioù an dourusvec'h ezkelligel, an dourusvec'h enkelligel hag un azdalc'h natriom bihanoc'h a-genfeur — ken ez eo natriomisvec'hiek ar plasma; erzerc'haet eo dre ar gouliñvoù, an heug ouzh an dour, ar c'hweladoù, an uswask talmerel ha strafuilhoù nerverl a c'hell mont betek ar c'homa; azoniad o tarvezout e-kerz skorted lemm al lounezh gant isvorc'h pe anvorc'h troazh ma tiounezer dreist muzul trefennadoù holenek pe glukozek, skorted digevassavet an avu, kirozioù an avu ezwanet re alies, skorted vras ar galon gant naoued al lounezh goude mezegadur troazhusvorc'hus peurliesañ; prederiet e vez dre lemm natriom ha dour dreist holl.

hyperimmunisation ◇ **hyperimmunization** ◇ **dreisthangaeañ** Muiaat argreskus feur antikorfoù ar bevedeg da heul enteñ arreat an hevelep antigen.

hyperinsulinémie ◇ **hyperinsulinaemia** ◇ **gwadusvec'h** g. **insulin**, **insulinwadusvec'h** g. Feur reñverek insulin er gwad, erzerc'haet, pa vez bras a-walc'h, dre un azoniad glukozwadusvec'hel.

hyperinsulinie ◇ **hyperinsulinism** ◇ **usvorc'h** g. **insulin**, **insulinusvorc'h** g. Reñver ar borc'hañ insulin gant an ilgreiz, o tevoudañ azoniad an insulin-usvorc'hegezh.

hyperinsulinisme ◇ **hyperinsulinism** ◇ **insulinusvorc'hegezh** b. Strafulhoù devoudet gant reñver borc'hañ an insulin; he stadañ a reer e daou zegouezh pennañ : 1) en azoniad Harris, naoued an ilgreiz o tevoudañ usvorc'h an insulin ha, da heul, gwadusvec'h glukoz, barradoù glizi, vaganadoù hag ezwalioù, 2) evel lodek en azoniad CHAOS (sl. **CHAOS : syndrome** ~).

hyperkalcycie ◇ ◇ **kelligusvec'h kaliom** g., **kaliomgelligusvec'h** g. Feur reñverek ar c'haliom enkelligel.

hyperkaliémie ◇ **hyperkaliaemia** ◇ **gwadusvec'h** g. **kaliom**, **kaliomwadusvec'h** g. Muiadur ar feur kaliom er gwad dreist 5,5 mmol/l; dec'han a ra daralladoù er c'halonvarrezad (gwagennoù T ampl, begek, kemparzhkek, strafuilhoù korvez grevus o nodiñ gant ar feuriou uhel); e stadañ a reer dreist holl er skorted lounezh pe da heul diounezadoù yac'hadel dreist muzul halioù kaliom.

hyperkératose ◇ **hyperkeratosis** ◇ **hiperkeratoz** g. Stroll dermatozioù naouus dre un uswe eus kornhaen an epiderm (iktioz, keratoderma, porokeratoz, gwenaenn) (sl. **épiderme**).

hyperlactacidémie ◇ **hyperlactacidaemia** ◇ **gwadusvec'h** g. **trenkenn laktek**, **laktekwadusvec'h** g. Feur reñverek trenkenn laktek er gwad (sl. **lactacidémie**).

hyperlactatémie ◇ **hyperlactataemia** ◇ **gwadusvec'h** g. **laktatoù**, **laktatwadusvec'h** g. Feur reñverek al laktatoù er gwad, o nodiñ e-kerz ar bleuz diwar daralladur ar glukozloezañ anaerat; an erzerc'had eo eus oloksigen ar gwiadoù; devoudañ a ra un akidoz kennevidel (akidoz laktek) gant strafuilhoù ar genskiant, uc'hanal ha dulaz, marvus war verr dermen (sl. **lactatémie**).

hyperleucocytose ◇ **hyperleukocytosis** ◇ **usniver** g. **leukokit**, **elwenn** g. Reñver niver al leukokit er gwad amredat (dreist 10 000/mL) (sl. **leucocytose**).

1 hyperlipémie, **hyperlipidémie** **2hyperlipémie**, **hypertriglycéridémie** ◇ **1 hyperlipaemia**, **hyperlipidaemia** **2 hypertriglyceridaemia** ◇ **1 gwadusvec'h lipid** g., **lipidwadusvec'h** g. **2 gwadusvec'h triglikérid**, **triglikéridwadusvec'h** g. 1 Aoz-erion 'zo a ra kensterioù eus *hyperlipémie* hag *hyperlipidémie*. 2 Seurtad lipidwadusvec'h naouus dre uheladur lipid ar gwad betek 60 ha 100 g/l, an usvec'h anezho o c'hoarvezout a driglikéridoù (dreist 20 ha 40 g/l) gant uheladur a-galz ar c'*hílomikronoù* (sl. *chilomicrons*) (triglikéridoù a orin ezdeuat) hag ur gwadvez laezhvanek.

hyperlipidémie ◇ **hyperlipidaemia** ◇ **gwadusvec'h** g. **lipid**, **lipidwadusvec'h** g. Reñver kementad bloc'hel al lipid er gwad, pe seurtad bennak e ve ar rann vuiek : lipoproteinoù (kolesterol, triglikéridoù, fosfolipidoù) pe trenkennoù druz rez; dreist 8 g/l emañ feur al lipid hag o vont betek 50 ha 100 g/l zoken; hervez seurtad al lipoproteinoù muiiek, e tiforc'her 5 rumm : *rizh I*, naouus dre vuiadur a-galz ar c'*hílomikronoù* hag an triglikéridoù (sl. *hyper-lipémie*); *rizh II*, naouus dre vuiadur ar β-lipoproteinoù hag ar c'holesterol, (daou seurtad anezho, ar *rizh IIa*, gant muiadur an LDL hepken, hag ar *rizh IIb* gant muiadur an LDL hag ar VLDL, sl. *hypercholestérolémie*); *rizh III*, kemmesk, gant muiadur kevret ar β-lipoproteinoù (alese ar c'holesterol) hag ar rak-β-lipoproteinoù (alese an IDL, triglikéridoù endeuat) — ent klinikel e noter ksantomoù stirennel ha dispuilhat, laurioù en argreuzenn ha tuadur d'an ateroskleroz; *rizh IV* (gwadusvec'h lipomikronoù) gant gwadvez laezhvanek puilh ennañ ar rak-β-lipoproteinoù hag an triglikéridoù endeuat (VLDL); e stadañ a reer er miksedem, en azoniad nefrotek, en diabet, gant ar rakdiabeteion borr hag urekwadusvec'hiek hag an alkooleion, e-kerz an ikterioù dre azdalc'h; raktuañ a ra d'an ateroskleroz; *rizh V*, dibaot, o tiraez ar re yaouank, o kevrediñ ar rizhoù I ha IV.

NOTENN : Darbennet eo an teskanvioù LDL (Sz. *low density lipoproteins*, Br. *lipoproteinoù douester izel*), VLDL (Sz. *very low density lipoproteins* Br. *lipoproteinoù douester izel kenan*), IDL (Sz. *intermediate density lipoproteins*, Br. *lipoproteinoù douster etreat*), HDL (Sz. *high density lipoproteins*, Br. *lipoproteinoù douester uhel*).

hyperlordose ◇ **hyperlordosis** ◇ **gourdrekwar** g. Derez uc'hek an drekwar.

hyperlysinémie ◇ **hyperlysinaemia** ◇ **gwadusvec'h** g. **lizin**, **lizinwadusvec'h** g. Reñver er gwad eus un amindrenkenn, al lizin, azon pennañ ur c'hleñved enzimitek hêrezhel dibaot diwar ur migennevid, anezhañ ur skoilh ouzh dispenn al lizin, erzerc'haet dre un dilerc'hiñ savder-pouez hag ul labanded; muiaet eo feur al lizin en troazh ivez (sl. **lysine**).

hypermagnésémie, **hypermagnésiémie** ◇ **hypermagnesaemia** ◇ **gwadusvec'h** g. **magnezium**, **magneziumwadusvec'h** g. Muiadur feur ar magnezium er gwad, a stader e skorted al lounezh.

hypermastie ◇ **hypermastia** ◇ **bronnusvent** g. Muiadur ec'honad ar vronn, ganti neuz ar wagrenn o laezhvorc'hañ.

hyperménorrhée ◇ **hypermenorrhoea** ◇ **mizusliñv** g. Reñver beradur ar mizioù.

hypermétrie ◇ **hypermetria** ◇ **uc'haen** g. Ezreolde ar fiñval naouus dre ampled reñverek ar fiñvoù, ar re-mañ o vont hebioù d'o fal; e kemm ouzh an ankedre, gant an uc'haen e chom reol durc'hadur ar fiñvoù; an arouez eo d'un anaf en ilpenn (sl. **atxie**, **cérébelleux : syndrome** ~, **dysmétrie**).

hypermétrope ◇ **hypertropic** ◇ **1 usstiwelek** aa. **2 usstiweleg** g. **-eion** 1 Gant an usstiwel. 2 Gouziviad an usstiwel.

hypermétropie ◇ **hypermetropia** ◇ **usstiwel** g. Direizh ar gouskogañ el lagad, naouus dre gengerc'hañ ar skinoù luc'h en tuhout d'al luc'h sae pa na c'hoari ket an argeidañ (sl. **amétropie**, **astigma-tisme**, **emmétropie**, **myopie**).

hypermétropique ◇ **hypertropic** ◇ **usstiwelel** aa. A-zave d'an usstiwel.

hypermimie ◇ **hypermimia** ◇ **usveid** g. Strafuilh ar meidiñ, naouus dre reñver ar jestroù hag an dremmveziou e kement hag eztaoladoù (orbidoù, h.a.) (sl. **amimie**, **dysmimie**, **hypomimie**).

hypermnésie ◇ **hypermnesia** ◇ **uskoun** g. Derc'h-aveadur ar c'hounerezh.

hypermyxie ◇ ◇ **glaurusvorc'h** g. Reñver borc'hañ ar glaur (sl. **mucus**, **muqueuse**).

- hypernatrémie** ◇ **hypernatraemia** ◇ **gwadusvec'h natriom g., natriomwadusvec'h** Muiadur ar feur natriom er gwad, ar feur reol er plasma o vezañ etre 2 ha 3,25 g/l (etre 120 ha 150 mmol/l).
- hypernatriurèse, hypernatriurie, hypernatriurie** ◇ **hypernatriuria** ◇ **troazhusvec'h g. natriom, natriomdroazhusvec'h g.** Muiadur ar feur natriom en troazh, ar feur reol o vezañ etre 2 ha 3,50 g/l (etre 120 ha 150 mmol/l).
- hypernéphrome** ◇ **hypernephroma** ◇ **hipernefrom g.** Anvad genadel yoc'hennou ar gwagrennoù us-lounezh (sl. *néphrocarcinome, oncocytole, phéochromocytome, surrénalome*).
- hyperostrogénie, hyperfolliculinie, hyperfolliculinisme** ◇ **hyperoestrogenism** ◇ **1 uc'hestrogenegezh b. 2 usvorc'h g. estrogenoù, estrogenusvorc'h g., estrogenusvorc'hegezh b.** 1 Reñver er bevedeg a estrogenoù naturel pe galvezadel. 2 Azoniad a stader *a)* gant ar venev ankaezourek, e rezh ur gaezouregzh kentrat, *b)* gant ar venev gaezourek, e rezh reñver pe steuz ar mizioù, muiadur an erzerc'hadoù rakviziaouel, azoniad ar pevarzekvet deiz, *c)* goude ar paouez mizioù, e rezh krozhwadiñvoù (sl. *métrorragie, quatorzième : syndrome du ~ jour*).
- hyperorchidie** ◇ **hyperorchidism** ◇ **klidennusvorc'h g., kolidennusvorc'hegezh b.** Reñver enborc'hañ ar glidenn, erzerc'h *a)* gant an oadour, dre zerc'haviñ an temz ganadel, *b)* gant ar bugel, dre un diorren kreudel ha ganadel kentrat diwar an adenom eus gwagrenn entremezel ar glidenn.
- hyperosmie** ◇ **hyperosmia** ◇ **usc'hwesha** Derc'havadur skiantenn ar c'hwesha.
- hyperostéoclastose** ◇ **hyperosteoclastosis** ◇ **hiperosteoklastoz g.** Uswezusted an osteoklast o tec'h an deloezañ an eskern, pe hollek (askornvideñv lounezhel, arskoedusvorc'hegezh kantael, mielom), pe lec'hiek (kleñved Paget an eskern, algodistrofiezh).
- hyperostéogénèse** ◇ **hyperosteogenesis** ◇ **askornuspar g.** Tevadur kaennenn an eskern.
- hyperostéolyse** ◇ **hyperosteolysis** ◇ **askornusloez g.** Distruj hollek reñverek an eskern, ankevassavet gant an askornbarañ, o trovadañ dirazekadur strewek an atel (osteoz arskoedennel, skoedusvorc'h, neridigezh mielomatus ha hanweel, kleñved Paget an eskern).
- hyperostose** ◇ **hyperostosis** ◇ **hiperostoz g.** Distummadur diwar devaat ur parzh askorn, un pe lies askorn.
- hyperostose endostale, hyperostose corticale généralisée** ◇ **endostal hyperostosis** ◇ **hiperostoz enaskornel, hiperostoz kaennenn hollek** Kleñved dibaot, hêrezhel dre dreuzkas aotzomek enkilek, o teraouiñ d'ar gaezouregzh, naouus dre zouesadur ha tevadur an holl eskern; en eskern hir, e vez barret kavenn ar mel gant usteñv kaennenn an dreuzenn; amwask an nervennoù a-glopenn a zevoud a-wechoù dallentez ha bouzarded; uhelaet eo er gwad feur ar fosfatazioù.
- hyperovarie** ◇ **hyperovaria** ◇ **vierezusvorc'h g.** Arc'hwelerezh reñverek ar vierez, erzerc'h dre azoniad an usvec'hiegezh follikulin ha lutein (Gl. *hyperfolliculinisme, hyperlutéinie*).
- hyperoxémie** ◇ **hyperoxaemia** ◇ **gwadusvec'h g. oksigen, oksigenwadusvec'h g.** Muiadur kementad an oksigen e-barzh ar gwad (sl. *anoxémie, hypoxémie*).
- hyperoxie** ◇ **hyperoxia** ◇ **gwiadusvec'h g. oksigen, oksigenwiadusvec'h g., usvec'h g. oksigen, oksigenusvec'h g.** Muiadur en unanenn amzer eus ar c'hementad oksigen dasparzhet gant ar gwad d'ar gwiadoù (sl. *anoxie, hypoxie*).
- hyperparathyroïdie, hyperparathyroïdisme** ◇ **hyperparathyroidism** ◇ **arskoedusvorc'h g., arskoedusvorc'hegezh b.** Azoniad dec'hantent *ent arnodel* dre ziounit an hormon arskoedenn pe, *ent klinikel*, dre arc'hwelerezh reñverek an arskoedennou e dianlen an adenom, dibaotoc'h ur c'harkinom pe un uswe-usteñv a 'r gwagrennoù, o trovadañ un osteoz arskoedennel, un osteoporoze strewek pe ur c'hrouanegezh a 'l lounezh; *ent vevoniell* e stader ur c'halkiomwadusvec'h, ur fosforwadusvec'h hag ur gwadusvec'h parathormon; a-wechoù e vez an arskoedusvorc'h eilvedel d'al lec'h, d'an askornvlodad, d'un negezh meinell, da anafoù lounezh pe c'hoazh d'ur c'hankr (mielom liesel).
- hyperparotidie** ◇ **hyperparotidism** ◇ **kilvoc'husvorc'h g., kilvoc'husvorc'hegezh b.** Usvent hag usvorc'h ar gwagrennoù kilvoc'h, a stader e-kerz ar vrazezded ha da geñver ar paouez mizioù.
- hyperpathie** ◇ **hyperpathia** ◇ **lauraeziñ** Merzhout evel laurus hag enkreuzus an eraezadoù hag ar c'hantaezadoù — ar stekiñ, da skouer, a vez merzhet evel un devañ — a stader en anafoù an derc'hvel hag ar forzhioù livennderc'hvelel.
- hyperpéristaltisme** ◇ **hyperperistaltism** ◇ **uc'hamdonnegezh b.** Reñver amdonnegezh ar stomok hag ar pervez.
- hyperphagie** ◇ **hyperphagia** ◇ **gourdebrñ** Euvriñ ur c'hementad boued reñverek (sl. *boulimie, phagomanie*).
- hyperphagique** ◇ **hyperphagic** ◇ **1 gourdebriat aa. 2 gourdebriad g. ed 3 gourdebriadel aa.** 1 Gant ar gourdebrñ. 2 Gouziviad ar gourdebrñ. 3 A-zave d'ar gourdebrñ.
- hyperphalangie** ◇ **hyperphalangia, hyperphalangism** ◇ **eloëñs g.** Bezañs un oeñs ouzhpenn (peurliesañ er meud).
- hyperphorie** ◇ **hyperphoria** ◇ **uswilc'hañ** Loakrezezh uswar (uswariañ) enkelat (sl. *ésophorie, exophorie, hétérophorie, hypotropie*).
- hyperphosphatémiant** ◇ **fosfatwadusvec'hius aa.** O vuiaat feur ar fosfatoù er gwad.
- hyperphosphatémie** ◇ **hyperphosphataemia** ◇ **gwadusvec'h g. fosfatoù, fosfatwadusvec'h g.** Muiadur feur ar fosfatoù er gwad (sl. *phosphorémie*).
- hyperpilosité** ◇ **hyperpilosity** ◇ **usvlevegezh b.** Anvad genadel blevegezhioù reñverek ar c'horf, ha pa ve e dalc'h an androgeneier pe dizalc'h diout (sl. *hirsutisme, hypertrichose, virilisme*).

- hyperpituitarisme** ◇ **hyperpituitarism** ◇ **usvorc'hegezh b. ar rakgougorfenn, hiperpituitaregezh b.** Azoniad e dalc'h uc'harc'hwelerezh kelligoù gwagrennel ar rakgougorfenn, an usvorc'hegezh eozinofil o vont erzerc'h dre ar geurvlēñchegezh pe ar geuregezh (adenom eozinofil), an usvorc'hegezh bazofil dre gleñved Cushing (adenom bazofil) (sl. *acromégalie, Cushing : maladie de ~, gigantisme*).
- hyperplaquetose, thrombocytose** ◇ **thrombocytosis** ◇ **elbladanou g.** Usniver ar pladanou dreist 500 000 dre μ l.
- hyperplasie, hyperplastic** ◇ **hyperplasia** ◇ **uswe g.** 1 Diorreadur reñverek ur gwiad pe un organ. 2 Nevezwe evodet diwar ur gwiad bonan hep kemm etre neuziadur hag arc'hwelioù an elfennoù nevezfurmet ha re ar gwiad orin (sl. *hétéroplasie, métaplasie, néoplasie*).
- hyperplasie surrénale congénitale** ◇ **congenital adrenal hyperplasia** ◇ **uswe ganedigel an uslounezhennou, uslounezh-uswe g. ganedigel** Ezreolded hêrezhel ar gwagrennoù us-lounezh, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, naouus dre zivigad unan eus an enzimoù ret da enaozerezh ar glukokortikoidoù ha, da heul, anvorc'h ar c'hortizol hag uspar erwezhiat an ACTH; e dianlen hemañ e tarvez uswe an uslounezhennou hag usvorc'h an androgeneier; ent klinikel e stader peurliesañ ar c'hourevezgezh hag an uswask talmerel; un hevelep divigad enzymatek zo ivez en orin degouezhoù a 'n azoniad uslounezhganadel hag a 'r gaenusvorc'hegezh.
- hyperpnée** ◇ **hyperpnoea** ◇ **uc'hanal g.** Reñver ampled loc'hadoù an analerezh ha, dre se, reñver ar gwenterezh skeventel (sl. *apnée, bradypnée, dyspnée, hypopnée, polypnée, tachypnée*).
- hyperpnée : épreuve de l'~** ◇ **hyperpnoea test, respiratory test** ◇ **prouad g. an uc'hanal** Muiadur diarvenn ampled an analerezh, o tevoudañ, gant gouziviaded 'zo : a) un dargrezañ kigennel, b) ur gwaskad tetaniezh, c) ur barrad droukfell, d) un diskenn trumm eus ar gwask talmerel, na c'hoarvez ket pa vez sklerozek an talmerennoù.
- hyperpneumatose** ◇ **hyperpneumatosis** ◇ **usvolc'h g., hiperpneumatoz g.** Dardennadur al logigoù skevent ha muiadur ar gorread gwentadel keñverek, diwar steviadur klapedus ar bronkez o lezel an aer da enteñ hag o c'hevennañ an ezteñ anezhañ.
- hyperprosexie** ◇ **hyperprosexia** ◇ **ussip g.** Stad vred o c'hoarvezout eus dillo an evezh, lemmdet ar c'hounerezh, primder an dezeverezh (sl. *aprosexie, hypoprosexie*).
- hyperprotéinorachie** ◇ **hyperproteinorrhachia** ◇ **keinusvec'h g. protid pe proteinoù, protidkeinusvec'h g., proteingeinusvec'h g.** Muiadur feur ar protid el liñvenn benn-kein.
- hyperprotidémie, hyperprotidémie** ◇ **hyperproteinaemia** ◇ **gwadusvec'h protid pe proteinoù, protidwadusvec'h g., proteinwadusvec'h g.** Muiadur feur ar protid er gwad, e dianlen muiadur tolz ar proteinoù pe an dourwadusvec'h.
- hyperpyrexie** ◇ **hyperpyrexia** ◇ **gourwrester g.** Terzhienn uhel kenan.
- hypersécrétion** ◇ **hypersecretion** ◇ **usvorc'h g., usvorc'hegezh b.** Reñver borc'hañ gant un organ gwagrennel.
- hypersensibilité** ◇ **1 hypersensitivity 2 hypersensitivity** ◇ **1 gourc'hizidigezh b. 2 dreistkizidigezh b.** 1 (Nervouriezh, Bredoniezh) muiadur kreñved ar erwezhiat pe ar merzhout eraezadel pe gantaezadel. 2 (Hangaoniezh) stad ur bevedeg a zo gantañ erzerc'hadoù kleñvedel da geñver ur c'heraezad antigen-antikorf (a-wechoù ez arverer da heñvelsterioù an termennoù *darwalladezh, allergiezh, hangae*, sl. *anaphylaxie, allergie, immunité*); stadoù an d. pe an *allergiezh* a renker hervez ar pad etre ar c'heraezañ ha nodiñ an erwezhiat : a) d. hozoek (Gl. *h. immédiate*), b) d. daleet pe *ampellet* (Gl. *h. retardée* pe *différée*); ur rumadur all a arverer : *rizh 1, d. darwalladel* (Gl. *h. anaphylactique*), hozoek, diwar antikorfoù amredat, an IgE (dezhi erzerc'hadoù hollek : darwalladel ha bleuz darwalladel, pe lec'hiek : asma, sifern ar bleuñv, linadell, gouliñv Quincke); *rizh 2, d. kelligpistriat* (Gl. *h. cytotoxique*), pa vez distrujet gant an antikorff hag ar glokaenn ar c'helligoù a zo enno an antigen (amwad loezadel unanhangaeel); *rizh 3, d. damzaleet* (Gl. *h. semitardive*) ma tasperzh ivez ar glokaenn, a stader e kleñvedoù an hangaegemplezhioù (anadenn Arthus, kleñved ar gwadvez, skeventadoù hangaeel); *rizh 4, d. kellighandizhek* pe *daleet* (Gl. *h. à médiation cellulaire* pe *retardée*), da heul gwazhañ eeun an antigen gant al limfokit T kizidikaet, o wezhiañ dre gelligpistriañ pe dre zilaosk limfokinoù (allergiezh tuberkulinel, distaol a 'n imboudennoù).
- hypersensibilité différée ou retardée : réaction d'~, réaction d'hypersensibilité à médiation cellulaire** ◇ ◇ **erwezh g. dreistkizidigezh daleet pe ampellet, erwezh dreistkizidigezh kellighandizhek** Erwezh hangaeel o c'hoarvezout gant gouziviaded ankizidikaet etre 24 ha 36 h goude keraezad un antigen allevek; erzerc'haat a ra ur c'henniñv antigen-antikorf, diwar wered al limfokit T hag ar makrofag, kelligoù o piaouañ araezioù kelligpistriusted hag o vorc'hañ limfokinoù (ha n'eo ket diwar wered antikorfoù rakvezant er gwadvez); e stadañ a reer e tro an erwezhoù kroc'hen ouzh an tuberkulin, ar flemmadennoù amprevaned, an aozadoù kimiek, en orin distaol an imboudennoù unspesadient, en erwezhoù difenn enepbakteri e-kerz an dorzhelegezh, ar brukelloz, an toksoplasmoz, al lovrezh, h.a. (sl. *allergie, auto-immunité, hypersensibilité2, mémoire immunologique*).
- hypersensibilité immédiate : réaction d'~** ◇ **erwezh g. dreistkizidigezh hozoek** Anadenn allergiezh dourennel diwar ar vezañs eus antikorfoù amredat er gwadvez, disoc'h eus ar c'henniñv o tarvezout da heul an eil keraez eus ar bevedeg gant an antigen kiriek; erwezh oc'h anadiñ herrek (goude etre un nebeut eilennoù hag un neveut eurvezhoù); erzerc'hañ a ra dre zarvoudoù hollek (darwalladel pe allergiek) pe lec'hiek (barrad asma, linadell, h.a.) (sl. *allergie, anaphylaxie, dégranulation des basophiles, facteur d'activation des plaquettes, hypersensibilité 2 (rizh 1 & 3), maladie du sérum, sérotonine*).
- hypersexualité** ◇ **hypersexualité** ◇ **usrevegezh b.** Reñver ar c'hoant revel.
- hypersidérémie** ◇ **hypersideraemia** ◇ **gwadusvec'h g. houarn houarnwadusvec'h g., elhouarn g. gwad, gwadelhouarn g.** Muiadur feur an houarn er gwad, a stader en amwadoù 'zo (loezadel, yud, talasemiezh, h.a.), en hemokromatoz, en ikteroù dre avufo.

hypersodique ◇ ◇ **usholenek** aa. A zo ennañ ur muiadur kloridenn natriom, sk. : *hanren usholenek*.

hypersomatotropisme ◇ **hypersomatotropism** ◇ **ussomathormonegezh** b. Teskad azonoù diwar ar reñver hormon somatotropek : *keurvleñchegezh*, *keuregezh*.

hypersomnie ◇ **hypersomnia** ◇ **ushun** g. Anvad rumm evit ar stadoù kleñvedel ma stader un hun reñverek ; kemm a lakaer etre an *ushun diastal*, azon eus an empennfo darreuziat, kleñved ar c'housk ha *yoc'hennou* 'zo a 'n empenn, hag an *ushun grezvarrek*, o tarvezout dre varradoù e-doug un nebeut muiadur ha betek eurvezhoù (hunfell, azoniad Pickwick, azoniad Kleine-Levin, mallozh Ondin) (sl. *Kleine-Levin : syndrome de ~, narcolepsie, Ondine : malédiction d'~, Pickwick : syndrome de ~*).

hyperspasmotique, hyperspastique ◇ **hyperspastic** ◇ **gourdasstrizhek** aa. Oc'h erzerc'hañ dre zargrezadoù garv, sk. : seizi gourdasstrizhek.

hypersplénisme ◇ **hypersplenía** ◇ **dreistfelc'hegezh** b. Azoniad naous dre isniver bras, dredat pe gevret, hemati, leukokit ha pladanoù er gwad amredat, dre wezhierzh reol pe vuiaet ar mel eskern, dre ar gwelladur pe ar pare dre felc'hezvenañ ; devoudet eo gant gwezhierzh reñverek ar felc'h, alies usteñvek, a zistruj ar c'helligoù gwad bezant ennañ, a bar antikorfoù gwazhus ouzh kelligoù ar gwad amredat pe a skoilh ouzh azvedigezh ha dilaoskidigezh kelligoù ar mel ; *kentael* e vez an *d.* (ikter loezadel ganedigel, purpura oltrombokitel hennadek, olneurokit felc'hel, olhemokit), pe *eilvedel* (paludegezh, torzhellegezh, kleñvedoù Hodgkin, Besnier-Bœck-Schaumann, Bryll-Symmers, direizhoù an amred porzhel).

hypersthénie ◇ **hypersthenia** ◇ **uc'henniñv** g. Derezh uhel an nerzh bevedel, ar gadarni, an deltu, an embregusted, an harzusted ouzh ar skuizhvez (sl. *adynamie, asthénie, endurance, sthénie*).

hypersthénique ◇ **hypersthenic** ◇ **uc'henniñvek** aa. O tiskouez uc'henniñv.

hyperstimulation ovarienne : syndrome d'~ ◇ **ovarian stimulation syndrome** ◇ **azoniad dreistfraouaat ar vierrez** Rouestlad diwar fraouaat ar vierrez (kalvezder aesaat an engehentañ, amkanet da gas ar bolc'hennou vierrez betek o azvedigezh dre ziouint gonadotrofinoù ezdeut pe danvezennou o vuiaet borc'herezh ar gonadotrofinoù endeuat), naous dre usvent ar vierrezoù en askont da gistou luteel, dre an torliñv ha zoken anazark da heul heforshaat ar c'horrwazhied, dre ar skorted lounezh arc'hwelel ha darvoudoù trombozenfraouel en izili krec'h e dianlen ar gwadisec'honad hag an dourwadisvec'h.

hypersympathicotonie ◇ **hypersympathicotonia, hypersympathicotonus** ◇ **dreistusren** g. **simpatek, hipersimpatikotoniezh** b. Derezh uhelañ an usren simpatek, erzerc'h dre vuiaer ar gwask talmerel dreist holl (sl. *sympathicotonie*).

hypersympathicotonique ◇ **hypersympathicotonic** ◇ **1 dreistusreek** aa. **simpatek 2 dreistusreel** aa. **simpatek** 1 Gant an dreistusren simpatek. 2 A-zave d'an dreistusren simpatek.

hypertélorisme ◇ **hypertelorism** ◇ **skarlagadagezh** b. Kammneuziad klopenndremmel naous dre ledanadur askell vihan ar genneg, dre se an tachad etre-podoù ha gwrizienn ar fri ha dre skaradur reñverek an daoulagad ; kevret alies gant ezreolderioù lagadel, labanded, bizanskar, askornvibar klopenndremmel (sl. *déléition, dysostose*).

1 hypertendu 2 hypertensif 3 hypertensif, hypertensioennel ◇ **hypertensive** ◇ **1 uswaskek** aa. **2 uswaskeiat** aa. **3 uswaskel** aa. 1 Gant an uswask. 2 O tevoudañ an uswask. 3 A-zave d'an uswask.

hypertension, hypertension artérielle, hypertension systémique ◇ **hypertension, high blood pressure, systemic hypertension** ◇ **uswask g., uswask talmerel, uswask trogorfat** Muiadur ar gwask e-barzh rouedad talmerennou an amred bras ; e 1999, gant Aozadur Bed ar Yec'hed, ez eo bet rummet liveoù an uswask hervez tri derez : I (140/150 mmHg evit ar gwask sistolel – 90/99 evit ar gwask diastolel), II (160/179 – 100/109), III (> 180 – 110) ; e dianlen an uswask e tarvez aliezik klopennadoù, strafuilhoù skiantennel leiek, glazoù an eizhaennou hag, a-wechoù, rouestlodoù grevus : darvoudoù gwazhiedel an nerveg, skorted ar c'hofig kleiz, skorted al lounezh ; ar furm liesañ eo an *uswask hennadek* ; dibaotoc'h e vez *furmoù eilvedel* d'ur gammneuziad (goudag an aortenn), d'ur pistriadur (regalis, simpatikomimeteier), d'ur lounezhad (parenkimatus pe wazhiedel) pe d'un uslounezhennad.

hypertension artérielle maligne ◇ **malignant arterial hypertension** ◇ **uswask talmerel yud** Furm an uswask marvus e berr amzer, o tizhoù peurliesañ ar re yaouank, o tarvezout e-kerz ur skorted lounezh (60 % an degouezhoù) pe un uswask nebant, hogos nepred d'un uswask lounezhwazhiedel ; naous eo, *ent neuziadurel*, dre anafoù strewek talmerennigfo fibrinoidel, marvennus hag isvullus muiel el lounezh hag o tec'h an usvorc'h renin, angiotensin hag aldosteron ; *ent klinikel*, dre ur gouruswask (250/150 mmHg), klopennadoù, luc'hseaf gant gouliñv ar vegenn, naouezennou ha gwadliñvoù ; dindan un nebeut mizioù e tarall ar stad hollek hag e tarvez ar marv diwar zarvoudoù empennpilhonel, kalonel ha dreist holl ur skorted lounezh.

hypertension artérielle pulmonaire, HTAP ◇ **pulmonary hypertension** ◇ **uswask skeventel** Muiadur ar gwask e-barzh rouedad talmerennou ar skevent dreist 35 mmHg (gwerzhad reol keitat : 20 mmHg), e dianlen pe kalonnaouedoù ganedigel 'zo gant ur skoev kleiz-dehou uhelgas, pe un harz reñverek ouzh diver ar gwad (bronkezskeventadoù henek, enfreier skevent kalzek pe arreet, isvolloù mintrek 'zo, kalonnaouedoù ganedigel 'zo gant skoev kleiz-dehou).

hypertension intracrânienne : syndrome de l'~ ◇ **intracranial hypertension** ◇ **uswask enklouennel** Azoniad naous dre ur c'hloppennad talel ha kilpenne, c'hweladoù, erzerc'hadoù lagadel (daouwel dre seizi ar VI^e re nervennoù a-gloppenn, gouliñv begennel dre zassav en ervez da zisoc'h gant an dallentez dre anteñv gweledel) ; o tedreñ buan pe buanoc'h etrezek ar goabrennegezh hag ar c'homa, an ustant kaherel trefadeg pe grezvarrek, strafuilhoù nervstruzhoù o tarallañ arc'hwelioù bevret an amred hag an analañ ; a-geñver emañ gant an uswask e gwazhied an empenn, e dianlen anafoù enklouennel war zeled (yoc'henn, gwatoñv, pugnez), darvoudoù gwazhiedel (grezvarroù gouliñv empennpilhonel diwar resmiadoù uswask talmerel, gwadliñvoù empenn pe bilhon, boukadur empenn), poreadoù (pilhonfo, empennfo), empennfoeñv (sl. *engagement cérébral, rigidité de décérébration*).

- hypertension portale** ◇ **portal hypertension** ◇ **uswask porzhel** Teskad azonou (torliñv, amred kengostezel, felc'husvent, gwadliñvou koazhadel) devoudet gant kaeladur an amred er wazhienn borzh, pe *enavuel* (kirroz), pe *ec'havuel* (isvull ganediged) ar wazhienn borzh gant ar bugel, tromboz ar wazhienn borzh).
- hyperthermie** ◇ **hyperthermia** ◇ **uswrez b., gwrester g.** Uheladur gwrezverk ar c'horf pe ur parzh anezhañ dreist ar werzhad reol (sl. *fièvre*).
- hyperthermie maligne d'effort** ◇ **exertion malignant hyperthermia** ◇ **uswrez yud diwar strivañ** Azoniad delanket gant ur strivad kigennel start ha hirbad en un amva tomm ha gleborek, o tiraez trumm tud yac'h (soudarded en embregerezh); naouus dre uheladur ar gwrezverk kreiz dreist 40°C, strafuilhoù nervvredel rust (arluze, koma), kalonustead gant falladur kalongwazhiedel, c'hwezennoù puilh, arouezioù kaherloezañ (uheladur an enzimou ar gwadveiz, ar CPK pergen), direizhoù kaouledin ar gwad, tizhadoù an avu hag al louezh; grevus e vez an dedro, marvus e 30 % eus an degouezhioù (sl. *coup de chaleur*).
- hyperthermie maligne per-anesthésique** ◇ **malignant hyperthermia of anesthesia** ◇ **uswrez yud an diaraeziañ** Azoniad dibaot o tarvezout e-kerz an diaraeziañ hollek, bet stadet er Stadoù Unanet, nemedennek en Europa, naouus dre un derzhienn o sevel herrek betek 43°C, dre reuter a 'r c'higennoù, dulaz, uswask talmerel, kalonustead; ent vevoniel e noter un akidiz kennevidel, gwadusvec'h kaliom, gwadisvec'h kalkiom, usvec'h an enzimou kaherel er gwadveiz; marvus e 60-70 % eus an degouezhioù; dindan gevarguz e chom an ardarzh: kenttuus e hañval bezañ ar c'hleñvedoù kaherel; goulakaat a reer ivez bezañs un namm hilel treuzkaset er mod trec'hek aotozomek.
- hyperthymie¹** ◇ **hyperthymia** ◇ **usnoa g.** Dere'havadur an noa pe etrezek ar gourboz, ar mania, pe etrezek ar gouvid, ar velankoliezh; hañvalout a ra an despizadur-mañ, hag eñ klasel, bezañ dilezet hiziv e gounid un despizadur strishoc'h dre an duedigezh d'ar gourboz (sl. *humeur, hypothyrie¹, thymie*).
- hyperthymie², syndrome hyperthymique, hyperthymisme, syndrome de Pende** ◇ **hyperthymism** ◇ **dreistoazoneg-ezh b.** Teskad strafuilhoù arzodet da arc'hwelerezh reñverek an toazon, a stader gant ar vugale hag ar grennarded; c'hoarvezout a ra eus ur vehinegezh hollek gant usteñv ar gwiadou limfoidel (gwechall anvet "limfategezh", Gl. *lym-phatisme*), skorted an diorreadur kreudel, revel ha bredel; da notañ e stader alies usteñv an toazon e miasteniezh Erb-Goldflam.
- hyperthyroïdie, hyperthyroïdisme** ◇ **hyperthyroidism** ◇ **skoedusvorc'h g., skoedusvorc'h hegezh b.** Reñver borc'hañ ar skoedenn, o tevoudañ arouezioù 'zo eus kleñved Basedow (sl. *Basedow : maladie de ~, basedowisme aigu*).
- hyperthroxinémie** ◇ **hyperthroxinaemia** ◇ **gwadusvec'h g. tiroksin, tiroksinwadusvec'h g.** Feur reñverek an tiroksin er gwad.
- hyperthroxinie** ◇ **tiroksinusvec'h g., tiroksinusvec'hiegezh b.** Stad naouus dre reñver ar feur tiroksin er bevedeg.
- hypertonie** ◇ **hypertonia** ◇ **1 usgrenn g. 2 ustant g., ustantegezh b.** 1 Stad ul liñvenn a zo ganti ur grenn (Gl. *pression osmotique*) uheloc'h eget grenn ul liñvenn a-ziastok ganti. 2 Muiadur kleñvedel an tant (tennder padek, andiarvenn, e diazalc'h an nervg, o tizhout ar c'higennoù er paouez, Gl. *tonus, tonicité, Sz. tonus, tone, tonicity*) (sl. *contracture, tonus*).
- hypertonie oculaire** ◇ **ocular hypertension** ◇ **uswask g. enlagadel** Muiadur kleñvedel ar gwask e liñvenn diabarzh al lagad (sl. *glaucome*).
- hypertonie osmotique du plasma : syndrome d'~** ◇ **excessive osmotic pressure of blood plasma** ◇ **azoniad usgrenn ar plasma** Teskad azonou diwar uheladur grenn ar plasma hag an दौरisvec'h kelligel dianlenat : itik, sec'hded glaourgenn ar genoù, koll pouez, asikted, morgud, trec'hwezh, terzhienn skañv, troazhisvorc'h, gwadusvec'h urea; azoniad devoudet gant uheladur feur kevionennoù ar plasma (natriom) dre adavadur dour : lounezhel (diabet heuz, troazhisvorc'h grennel diabetieon 'zo, h.a.), koazhadel (c'hweladurioù, suc'hadurioù stomok, darc'hoalioù), kroc'henele (c'hwezennoù), analadel (briantenbenañ), pe dre ziouer an enankadoù dour; er ervez da zisoc'h gant ur c'homa uc'hosmoler; strafuilhoù o kizañ da heul an diounit dileizhennoù isgrennek kevret gant an hanren hep hollen.
- hypertonie utérine** ◇ **uterine hypertension** ◇ **ustant krozhel** Reñver padek tant diazez ar grozh e-kerz gwentloù ar gwilioud.
- hypertrichose** ◇ **hypertrichosis** ◇ **gourblevegezh b.** Derezh kentañ an usvlevegezh venevel, reñver kresk ar blev er rannbarzhioù blevek reol, an daou zerez all o vezañ ar *greoñegezh* hag ar *c'houvegezh* (sl. *hirsutisme, hyperpilosité, virilisme*).
- hypertrophie** ◇ **hypertrophy** ◇ **1 usteñv g. 2 usvent g.** 1 Usvent a orin mezhuere. 2 Muiad ec'honel a ne vern pe orin; termenou damheñvelster, nemet ez eo *usvent* hollekoc'h ha gwel eo arverañ *usteñv* hepken pa zaveer da orin mezhuere an usvent (sl. *atrophie, hypotrophie*).
- NOTENN : Tennañ a ra Gl. *hypertrophie, Sz. hypertrophy*, arveret da gentañ er ster 1 hepken, da dalvezout kement ha "kresk ec'honad" nemetken hep ma lakafed e penn kont arbenn teñvel pe anafel an usvent; heñvel dra, eo aet emaez arver mezegele *Sz. overgrowth*, a oa kevatal dik Br. *usteñv*.
- hypertrophie ventriculaire** ◇ **ventricular hypertrophy** ◇ **usvent kofigel** Muiadur tolz ar c'hofigoù, ha n'eo ket tevadur ar speur anezho hepken, testet dre zaralladur ar c'halonvarrwezed, anezhañ dehou- pe gleizwariadur an tredanahel, daskemmadoù ar wagenn QRS (muel, usheledek ha ledanaet) hag ar wagenn T (arblat ha gwariet war an tu kontrol da wariadur ar wagenn QRS), direizhoù oc'h erzerc'haat ur regas padek eus ar galon.
- hyperuraturie** ◇ **hyperuraturia** ◇ **troazhisvec'h g. uratoù, urattroazhisvec'h g.** Muiadur feur an uratoù en troazh.
- hyperuricémie** ◇ **hyperuricaemia** ◇ **gwadusvec'h g. trenkenn urek, urekwadusvec'h g.** Muiadur feur an drenkenn urek er gwad amredat (sl. *goutte*).

- hyperuricosurie** ◇ **hyperuricuria** ◇ **troazhusvec'h** **trenkenn urek, urektroazhusvec'h** Muiadur ar c'hementad trenkenn urek ezvevennet gant al lounezhi.
- hypervascularisé** ◇ **hypervascular** ◇ **uswazhiedet** aao., **uswazhiedek** aa. Diorreet reñverek ar gwazhied ennañ.
- hyperventilation pulmonaire** ◇ **pulmonary hyperventilation** ◇ **uswentadur** g. **skevent** Muiadur ar c'hementad aer enanalet dre vunud e-barzh logigoù ar skevent ha, dre se, reñver oksigen e-keñver bevezadur ar bevedeg : devoudañ a ra leiadur feur ar CO₂ er gwad hag un alkaloz analadel (sl. **hypocapnie**).
- hypervitaminémie A provoquée** : **épreuve de l'~** ◇ **vitamin A tolerance test** ◇ **proud ar gwadusvec'hiañ vitamin A, proud gougumer ar vitamin A** Araezad arveret evit studiañ kennevid an triglikeroù : dezventet e vez ar vitamin A er gwadvez 3, 6, 9, 12 ha 24 h goude euvriñ 500 000 unanenn a 'r vitamin ; hemañ, dileizhet e-barzh ar c'hilomikron, a vez suget en o ser gant ar pervez ha treuzkaset d'ar gwad ; kevreizh eo feur an triglikered er gwadvez da feur ar vitamin A (sl. **chilomicrons, hyperlipémie, hyperlipi-démie, vitamine A**).
- hypervitaminose** ◇ **hypervitaminosis** ◇ **usvitaminegezh** b. Strafulhoù diwar ar reñver diounit vitamin dre liaoù pe bouedoù ; termen arveret dreist holl e-keñver ar vitamin D.
- hypervolémie** ◇ **hypervolaemia** ◇ **gwaduc'hec'honad** g. Muiadur ec'honad hollet ar gwad amredat.
- hyphéma** ◇ **hyphaema** ◇ **hifema** g. Fennad gwad e kamb ar arok ar voull lagad.
- hypnagogique** ◇ **hypnagogic** ◇ **enhunel** aa. O c'hoarvezout d'an ampoent ma emroer da gousket, sk. : *trezerc'hioù enhunel* (sl. **hallucination, hypnopompique**).
- hypnalgie** ◇ **hypnalgia** ◇ **hunlaur** g. Laur anglevet e-kerz ar c'housked nemetken, o steuziañ pa zihuner.
- hypnoanalyse** ◇ **hypnoanalysis** ◇ **hunelfennerezh** g. Kalvezder bredkurañ a c'hoarvez a lakaat ar gouziviad da gousket dre e deoññ (*teoghun*, Gl. *hypnose*), pe dre ziounit dezhañ un huneiad (*kimivorzañ*, Gl. *subnarcose*) ha ren gantañ un emziviz.
- hypnoanesthésie** ◇ **hypnoanaesthesia** ◇ **hundieraeziñ** Kalvezder dieraeziñ o korvoñ an teogerezh.
- hypnodrasie** ◇ **hunnioñvañ** g. Ober renet e-kerz ar c'housked (hunvaleerezh, spontoù noz, h.a.).
- hypnogramme** ◇ **hypnogram** ◇ **hunvarrezad** g. Kevregad o terc'hennañ dedro ar c'housked dre araez an empenvarrezañ, al lagadvarrezañ ha kaherrvarrezañ ur gigen ahelel (kigen an elgezh).
- hypnologie** ◇ **hypnology** ◇ **hunouriezh** b. Studi ar c'housked hag ar strafuilhoù anezhañ.
- hypnopompique** ◇ **hypnopompic** ◇ **ec'hunel** aa. O c'hoarvezout d'an ampoent ma tihuner, sk. : *trezerc'hioù ec'hunel* (sl. **hallucination, hypnagogique**).
- hypnose** ◇ **hypnosis** ◇ **teoghun** g. Seurtad kousked diglok dec'hanet dre ar goudreñ gant komzoù, selled pe jestroù un oberataer (*teoger*, Gl. *hypnotiseur*) en amkan da zieubiñ ar gouziviad diouzh kantaezadoù diskaset er stad dihun.
- hypnoseurie** ◇ **sleeping-sickness asylum** ◇ **kouskeri** b. Diazezadur o talvoud da vinic'hi da c'houziviaded kleñved ar c'housk nad int mui evit bastañ d'o ezhommoù.
- 1 hypnotique** 2 3 **hypnotique, hypnogène, somnifère, soporifique** ◇ **1 hypnotic** 2 3 **hypnotic, somniferous, somnific, soporific, hypnagogue** ◇ **1 teoghunel** aa., **teogerezhel** aa., **teogadel** aa. 2 **huneiat** aa. 3 **huneiad** g. -où, **hunwezher** g. -ioù 1 A-zave d'an teoghun pe d'an teoññ. 2 O tec'han ar c'housked. 3 Lia o tec'han ar c'housked.
- hypnotiser** ◇ **to hypnotize** ◇ **teoññ** Lakaat er stad a deoghun.
- hypnotisme** ◇ **hypnotism** ◇ **teogerezh** g. Embregerezh an teoññ.
- hypo-insulinisme** ◇ **hypoinsulinaemia, hypoinsulinism** ◇ **1 isvec'h** g. pe **gwadisvec'h** g. **insulin** 2 **insulinisvec'hiegezh** b. 1 Diouer insulin (leiadur ar bec'hioù insulin er plasma, dezventet dre skinghangaeouriezh ha keñveriet gant bec'hioù testoù reol). 2 Negez insulin da heul an isvorc'h anezhañ gant an ilgreiz, erzerc'haet dre un diabet c'hwek grevus.
- hypo-œstrogénémie, hypo-œstrogénie** ◇ **hypoestrogenaemia** ◇ **isvec'h** g. pe **gwadisvec'h** g. **estrogenoù, estrogenisvec'h** g. pe **estrogenwadisvec'h** g. Leiadur feur an estrogenoù er gwad.
- hypo-œstrogénie, hypofolliculinie, hypofolliculinisme** ◇ **hypoœstrogenism** ◇ **estrogenisvorc'hegezh** b., **isestrogenegezh** b. Teskad ar strafuilhoù e dianlen an estrogenisvorc'h : d'ar gaezouregezh, mizanlinv kentael, alies bugelvanegezh ; gant an oadourez yaouank ha d'ar paouez mizioù, ouzhpenn steuz ar mizioù, isteñv an organoù genel, bouilhadoù tomm, alies border ha dulaz an eizhaennoù.
- hypo-orchidie, hypotestostéronie** ◇ **hypoorchidia** ◇ **klidennisvorc'h** g., **klidennisvorc'hegezh** b. Leiadur enborc'hañ ar glidenn, o tevoudañ bugelvanegezh ha tizogvanegezh.
- hypo-osmie, hyposmie** ◇ **hyposmia** ◇ **isc'hwasha** g. Leiadur kizidigezh skiantenn ar c'hwasha.
- hypo-ovarie** ◇ **hypovaria** ◇ **vierezisvorc'h** g. Leiadur enborc'hañ ar vierez (sl. **hypo-œstrogénie**).
- hypo-uricémiant** ◇ **1 urekwadisvec'h** hius aa. 2 **urekwadisvec'hier** g. -où 1 O leiaat feur an drenkenn urek er gwad. 2 Lia urekwadisvec'h hius.
- hypo-uricémie, hypuricémie** ◇ **hypouricaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **trenkenn urek, urekwadisvec'h** g. Leiadur feur an drenkenn urek er gwad amredat.

- hypoacousie** ◇ **hypoacousia**, **hypoacousis** ◇ **isklev** g. Leiadur al lemmded kleved.
- hypoalbuminémie** ◇ **hypoalbuminaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **albumin**, **albuminwadisvec'h** g. Leiadur feur ar seromalbumin er gwad (sl. *analbuminémie*).
- hypoalgésie** ◇ **hypoalgesia** ◇ **isgost** g. Leiadur ar merzhout al laur.
- hypoallergénique** ◇ **hypoallergenic** ◇ **1 isallergenek** aa. **2 isallergenel** aa. **3 isallergeiat** aa. 1 Hep nemeur a allergen. 2 A-zave d'un nemeur a allergen. 3 Hep nemeur a riskl da zec'han un erwezh allergek, sk. : *ur stavell isallergeiat*.
- hypoandrogénie**, **hypoandrogénisme** ◇ **hypoandrogenism** ◇ **1 androgenisvec'h** g. **2 isandrogenegezh** b. 1 Diouer an hormonou gourevus (androgenoù) er bevedeg, borc'het gant an uslounezhenoù hag ar c'hliedenoù, ha pa ve kentael pe eilvedel d'un divigad eus ar stimulinou gougorfennel keñverek. 2 Strafulhoù devoudet gant an androgenisvec'h (sl. *androgène : hormones ~s, androgénie, hyperandro-génie, virilisant, virilisme*).
- hypoazoturie** ◇ **hypoazoturia** ◇ **troazhisvec'h** g. **nitrogen**, **nitrogendroazhisvec'h** g. Feur diouerek an nitrogen ezvevennet dre an troazh (urea, uratoù) (sl. *azo-turie, hyperazoturie*).
- hypobare** ◇ **hypobaric** ◇ **isamwask** aa. Dindan amwask izeloc'h eget an aerwask, da skouer e-barzh ar c'haelogoù diamwaskañ (Gl. *caissons à dépression*) (sl. *dépressothérapie*).
- hypocalcémie** ◇ **hypocalcaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **kalkiom**, **kalkiomwadisvec'h** g. Izeladur ar feur kalkiom er gwad dindan 90 mg/l (2,25 mmol/l), stadet en arskoedisvorc'h hag en askornvloadad dreist holl; leiadur rann ionaet ar c'halkiom eo a zevoud an dedaniezh (sl. *calcémie, hypercalcémie, tétanie*).
- hypocapnie** ◇ **hypocapnia** ◇ **karboisvec'h** g. Leiadur feur ar CO₂ dileizhet e plasma ar gwad talmerel oc'h erzerc'haat un uswendatur skevent (sl. *hypercapnie, hypoventilation pulmonaire*).
- hypochlorémie** ◇ **hypochloroemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **klor**, **klorwadisvec'h** g. Leiadur feur ar c'hlor e plasma ar gwad, alies e dianlen ur fuad klor dre hent koazhadel (c'hweladoù, darc'hoal puilhek) pe ur skorted lounezh.
- hypochlorite de sodium : solution d'~** ◇ **sodium hypochlorite solution** ◇ **dileizhenn** b. **hipoklorit natriom** Dilouezer ha dilester haluzennet a arverer dileizhennoù tanav anezhañ dre arloaduriou lec'hiek.
- hypocholémie** ◇ **hypocholaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **livegennoù bestlel**, **bestlwadisvec'h** g. Leiadur al livegennoù bestlel er gwadvez dindan ar feur reol.
- hypocholestérolémiant** ◇ **hypocholesterolaemic** ◇ **1 kolesterlwadisvec'h**us aa. **2 kolesterlwadisvec'hier** g. -où 1 En araez da leiaat feur ar c'holesterol er gwad. 2 Lia kolesterlwad-isvec'hier.
- hypocholie** ◇ **hypocholia** ◇ **bestlisvorc'h** g. Leiadur ar borc'hañ bestl.
- hypochondrogenèse** ◇ **hypochondrogenesis** ◇ **migornispar** g. Seurtad leiek ar migormanpar (sl. *achondrogenèse*).
- hypochondroplasia** ◇ **hypochondroplasia** ◇ **migorniswe** g. Migornviwe hêrezhel nes d'ar migorangwe, naouus dre ar savder bihan, hirder ar c'hef (gant kein plat), berder an izili (gant bizied krak ha kenforc'hus), tevder ar penn (gant pukadur gwrizienn ar fri ha stumm krommvegek ar stavn askornek) (sl. *achondroplasia, chondrodysplasia*).
- hypochromie** ◇ **hypochromia** ◇ **1 islivegad** g. **2 amwad** g. **isivel** 1 Anvad rumm leiaoù livegad ar c'hroc'hen : vitiligo, h.a. 2 Amwad naouus dre isvec'h an hemoglobin en hemati (sl. *anémie hypochrome*).
- hypocoagulabilité** ◇ **hypocoagulability** ◇ **iskaouledusted** b. Diouer araezusted ar gwad da gaoulediñ, naouus dre leiadur ar buanez kaoulediñ, andalet dre ar prouad gougumer an heparin in vitro (*i. padventadel*, Gl. *h. chronométrique*) hag an tromboelastografiiñ (*i. lumiadel*, Gl. *h. structurale*) (sl. *coagulabilité, hypercoagulabilité, isoagulabilité*).
- hypocomplémentémie** ◇ **hypocomplementaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **klokaenn**, **klokaennwadisvec'h** g. Leiadur ar feur klokaenn er gwad.
- hypocondre**, **TA regio hypochondriaca** ◇ **hypochondrium** ◇ **rannbarzh** g. **gougestadel**, **gougestadenn** b. Rannbarzh kostezel arak a 'r c'hof, loet e diavaez an argreuzenn dindan migern ar c'hostoù; emañ ar c'hougestadenn dehou e-keñver tolbezenn dehou an avu, ar c'hougestadenn gleiz e-keñver ar felc'h, tolbezenn gleiz an avu, korf ar stomok ha klin kleiz ar c'holon.
- hypochondriaque** ◇ **1 hypochondriacal** **2 hypochondriac** (al) **3 hypochondriacal** ◇ **1 hipokondriak** aa. **2 hipokondriak** g. -ed **3 hipokondriakel** aa. 1 Gant an hipokondriezh. 2 Gouziviad an hipokondriezh. 3 A-zave d'an hipokondriezh, sk. : *ambren hipokondriakel*.
- hypocondrie** ◇ **hypochondria** ◇ **hipokondriezh** b. Tuadur kleñvedel da vezañ nec'het hep abeg gant yec'hed an unan pe arc'hwelerezh un pe lies organ; kemm a lakaer etre ur furm leiek, pe *hipokondriezh neurozel*, pa chom emouez ar gouziviad ouzh kleñvedegezh e brederi, hag ur furm vuiek, pe *hipokondriezh ambreel*, ma kred da vat bezañ gant ur c'hleñved grevus (ur pore, ur pistriadur, ur c'hankr); er stadoù eizhañ e stader un *ambren a 'n anrevoud* (Gl. *délire de négation*) pe *azoniad Cotard*, ar c'hlañvour o haeriñ n'eus ket eus organoù 'zo eus e gorf ha betek eus e gorf e unan (sl. *idées de négation*).
- hypoconvertinémie** ◇ **hypoconvertinaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **konvertin** Feur plasmatek izel ar c'honvertin, pseudoglobulin o perzhiañ er c'haoulediñ, o tisoc'h eus dazgwered ar prokonvertin (parenn VII) gant an tromboplastin.
- hypocrinie** ◇ **hypocrinism** ◇ **isvorc'h** g., **isvorc'hegezh** b. Leiadur ar borc'hañ gant ur wagrenn, an azoniad devoudet gantañ.
- hypocuprémie** ◇ **hypocupraemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **kouevr**, **kouevrwadisvec'h** g. Leiadur feur ar c'houevr er gwad.

- hypoderme** ◇ **hypodermis** ◇ **goudonenn** b. Gwiad kellaouek loet dindan an derm, gwazhiedet puilh hag o c'hoarvezout a gourzadoù gwiennoù dastennek laosk, etrezo flipigoù behin.
- hypodermite** ◇ **hypodermic inflammation** ◇ **goudonennfo** g. Anvad genadel oc'h arouezñ nep anaf taniennel lemm pe henek eus ar gwiad kellaouek endan-groc'hen; pa vez astennet an danijenn d'an derm e komzer eus tonenngoudonennfo (Gl. *dermo-hypodermite*).
- hypodermoste** ◇ **hypodermosis** ◇ **hipodermoz** g. Seurtad miiaz endan-groc'hen diwar skraperezh larvenned ur gelienenn, *Hypoderma bovis* pe *H. lineatum*.
- hypodontie** ◇ **hypodontia** ◇ **dentisniver** g. Anrevoud dent 'zo.
- hypoergie**, **hypoallergie** ◇ **hypoergia** ◇ **hypoergiezh**, **hypoallergiezh** Furm izek an erwezhañ allergek (sl. *allergie*, *hyperergie*).
- hypoesthésie** ◇ **hypoesthesia** ◇ **iseraez** g. Leiadur an eraeziñ e furm pe furm anezhañ.
- hypofibrinémie**, **hypofibrinogénémie**, **fibrinopénie**, **fibrinogénopénie** ◇ **hypofibrinogenaemia**, **fibrinogenopenia** ◇ **gwad-isvec'h** g. **fibrinogen**, **fibrinogenwadisvec'h** g., **olfibrinogen** g. Leiadur feur ar fibrinogen er gwad (sl. *fibrinogénopénie*).
- hypogalactie** ◇ **hypogalactia** ◇ **laezhisvorc'h** g. Skorted ar borc'hañ laezh.
- hypogammaglobulinémie** ◇ **hypogammaglobulinaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **γ-globulinou**, **γ-globulinwadisvec'h** g. Diouer ar feur γ-globulinou er gwadvez (sl. *agamaglobulinémie*, *dys-gammaglobulinémie*, *gammaglobuline*, *gammopathie*, *hyper-gammaglobulinémie*).
- hypogastre**, **région hypogastrique**, **région pubienne**, **TA regio publica** ◇ **hypogastrium** ◇ **rannbarzh** g. **kaezourel**, **kaezourenn** b. Rannbarzh kreizer hag izelañ ar c'hof, loet etre ar begel hag ar c'haezour, etre poullou ar glun.
NOTENN : *Erratum* da zougen e *Geriadur ar Gorfadurezh*, Preder 1999 : p. 165 (–15) [*rannbarzh g. gougestadel*] → *rannbarzh g. kaezourel*.
- hypogénésie** ◇ **hypogenesis** ◇ **ispar** g. Skorted an diorren gant un organ pe un hinienn.
- hypogénitalisme**, **hypogonadisme** ◇ **hypogenitalism** ◇ **isganadegzh** b. Diouer enborc'hañ ganadel, pe diwar daralladur kentael ar glidenn pe ar verez, pe e dianlen ur skorted a 'r c'hougorfenn (sl. *hypergénitalisme*).
- hypoglycémiant** ◇ **hypoglycaemic** ◇ **1 glukozwadisvec'h** g., **2 glukozwadisvec'hier** g. **-ioù** 1 O leiaat ar glukozwadvec'h. 2 Lia o leiaat ar glukozwadvec'h.
- hypoglycémie** ◇ **hypoglycaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **glukoz**, **glukozwadisvec'h** g. Leiadur feur ar glukoz er gwad dindan 0,50 g/l (2,8 mmol/l).
- hypoglycémie provoquée** : **épreuve de l'~**, **épreuve de Radoslaw** ◇ **insulin tolerance test** ◇ **prouad ar glukozwadisvec'hiañ** Dezventañ ar glukoz er gwad e-doug an div eurvezh da heul an ensinkludur gwazhiennel, war yun, eus 12 unanenn insulin; ent reol e vez izelaet ar gwadvec'h glukoz eus 50 %; ul leiañ dreist 60 % a verk ur gizidigezh reñverek ouzh an insulin (skorted an uslounezhenn pe ar c'hougorfenn), ul leiañ dindan 40 % zo arouez un insulinharzusted darnel.
- hypoglycémique** : **coma** ~ ◇ **hypoglycaemic coma** ◇ **koma g. glukozwadisvec'hel** Grevusañ stad an azoniad glukozwadisvec'hel, naouus dre ar morvitellerezh gant dargrezadoù hollek, stroñsadoù kigennek, arouez Babinski daoudu; o teraouiñ a-wechoù dre un prantad enkreuz, saouzanegezh pe vroudedigezh; o tarvezout e dianlen yoc'hennou 'zo eus an ilgreiz (*insulinusvorc'hegezh*, sl. *hyperinsulinisme*), skorted an uslounezhennou, ar rakgougorfenn, an avu pe, gant an diabeteion, an diounit reñverek insulin pe sulfamidoù glukozwadisvec'h.
- hypoglycémique** : **état ou syndrome** ~ ◇ **hypoglycaemic syndrome** ◇ **stad pe azoniad glukozwadisvec'hel** Teskad ar strafuilhoù devoudet gant leiadur ezreol feur ar glukoz er gwad : dinerzhded, c'hwezennoù, ranklezennoù, ezwalioù gant pe hep glizi, koma.
- hypoglycorachie** ◇ **hypoglycorrachia** ◇ **keinisvec'h** g. **glukoz**, **glukozkeinisvec'h** g. Leiadur feur ar glukoz el liñvenn benn-kein (pilhonfo linek).
- hypoguesie**, **hypoguesite** ◇ **hypoguesia** ◇ **istañva** g. Gwanadur skiantenn an tañva.
- hypogunisme** ◇ **isvenevegezh** b. Arvez bugelvanek ar merc'hed yaouank chomet skort o arouezioù revel.
- hypohidrose** ◇ **hypohidrosis** ◇ **c'hwezisvorc'h** g. Diouer ar borc'hañ c'hwez (sl. *anhidrose*, *hyperhidrose*).
- hypokaliémie** ◇ **hypokaliaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **kaliom**, **kaliomwadisvec'h** Leiadur feur ar c'haliom er gwad diwar goll ar c'haliom, pe dre an hent koazhadel (c'hweladoù pe darc'hoal), pe dre vizassug tuellennel.
- hypokinésie**, **hypocinésie** ◇ **hypokinesia** ◇ **isfiñv** g., **isfiñvegezh** b. 1 Leiaat ampled ha buanded ar fiñvoù (sl. *akinésie*, *bradykinésie*, *dyskinésie*). 2. Leiaat argrezusted ar c'haher kalon a stader e skorted ar c'hofig kleiz. 3 Leiaat aliested ha kreñvder argrezadoù ar grozh e-kerz ar gwentloù (sl. *hypercinésie*).
- hypolaryngite**, **laryngite sous-glottique** ◇ **hypolaryngitis** ◇ **garloc'hennfo** g. **endan-darzh**, **endandarzhfo** g. Tanienn kavenn endan-darzh ar c'harloc'henn ha parzh krec'h ar vrian.
- hypolipémie** ◇ **hypolipaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **triglikéridoù**, **triglikéridwadisvec'h** g. Seurtad lipidwadisvec'h naouus dre izeladur an triglikéridoù, stadet e-kerz gwadnaouedoù 'zo hag ar c'hirrozioù gant skorted avu (sl. *hyperlipémie*).

- hypolipidémiant** ◇ **1 lipidwadisvec'h**ius aa. **2 lipidwadisvec'hier** g. -ioù 1 O leiaat feur lipid ar gwad. 2 Lia o leiaat feur lipid ar gwad.
- hypolipidémie** ◇ **hypolipidaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **lipid, lipidwadisvec'h** g. Leiadur al lipid hollet bezant er gwad e rezh lipoproteinoù, stadet e-kerz ar c'hirroziou gant skorted avu (sl. *hyperlipidémie*).
- hypomane** ◇ **hypomaniac** ◇ **1 gouvaniak** aa. **2 gouvaniak** g. -ed 1 Gant ar gouvania. 2 Gouzviad ar gouvania.
- hypomaniaque** ◇ **hypomaniac** ◇ **gouvaniakel** aa. A-zave d'ar gouvania.
- hypomanie** ◇ **hypomania** ◇ **gouvania** g. -où Furm leiek ar mania oc'h anadiñ evel un tued a neuzid pe o tedreiñ dre resmiadoù, naouus dre ar vroudedigezh (gourboz, anc'hrez, diskelusted), an devredadoù reñverek, ar c'hentodennoù dizurzhiak; dav merkañ e chom dispis al linenn disparti etre *gourboz* ar gouvania hag an *hevred*, tuedigezh vonan eus an neuzid (sl. *cyclothymie, dysthymie, euphorie, excitation, hyperthymie¹, manie*).
- hypomastie** ◇ **hypomastia** ◇ **bronnisvent** g. Diouer diorreadur an divvronn.
- hypoménorrhée** ◇ **hypomenorrhoea** ◇ **mizisliñv** g. Skorted beradur ar miziou.
- hypomimie** ◇ **hypomimia** ◇ **isveid** g. Skorted ar meidiñ (an eztaoliñ dre jestroù ha dremmveziou) (sl. *amimie, dysmimie, hypermimie*).
- hyponychium (TA)** ◇ **hyponychium** ◇ **danivinenn** b. Epiderm loet dindan parzh pellek an ivin (sl. *éponychium*).
- hypophalangie** ◇ **hypophalangia, hypophalangism** ◇ **oloefs** g. Ezvezañ un pe lies oefs.
- hypophobie** ◇ **hypophobia** ◇ **olaon** g. Tued neuzid naouus dre ezvezañ an aon rak an dañjer, sellet hervez an degouezhioù hag ar speredegezhioù evel skouerius (merzherion, gouroned, kamikazeed), evel kospadus (fellerion, koulerion, gourzhtroerion) pe evel azon ur bredanaez (psikopated, meurvreaded, neurozeion).
- hypophorie** ◇ **hypophoria** ◇ **iswilc'hañ** Ankensteud (loarkreuzh) iswar enkelat (sl. *ésophorie, ésotropie, exophorie, exotropie, hypotropie*).
- hypophosphatasie** ◇ **hypophosphatasia** ◇ **fosfatizisvec'h** g. Kleñved kennevidel hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, naouus dre wadisvec'h ar fosfatizioù alkaliel, troazhusvec'h ar fosfoetanolamin ha dirazekadur strewek an eskern, oc'h erzerc'hañ ent klinikel peurliesañ en oad kentañ dre gammneuziadoù (klopenn boulllek, izili berr hag argromm, arzornioù tevaet), treutadur, strafuilhoù koazhadel, barradoù glizi, resmiadoù dulaz hag un dedro marvus war verr dermen.
- hypophysaire** ◇ **hypophyseal** ◇ **gougorfennel** aa. A-zave d'ar c'hougorfenn; *azoniadoù gougorfennel* a reer eus ar rummad strafuilhoù a-geñver gant miarc'hwel ar c'hougorfenn: keurvlêncegezh, keuregezh, azoniad Babinski-Fröhlich, kleñved Cushing, azoniad Sheehan, kleñved Simmonds, h.a.; dindan an anvad *azoniad gougorfennel gougel* e voder anadennoù a ve diwar ur skorted leiek eus ar c'hougorfenn, anezho an treutadur, an asikted, an iswask talmerel, hep fallezh wirion (sl. *adiposo-génital : syndrome (hypophysaire) ~*).
- hypophyse, glande pituitaire** ◇ **pituitary gland, (TA) hypophysis** ◇ **gougorfenn** b. Gwagrenn enborc'hañ loet e diaz an empenn e-barzh an dibr turkek, anezhi ur parzh adreñv, an drekgougorfenn (TA *neurohypophysis*) e-pign ouzh ar gouzerc'hvel dre ar founilh (TA *infundibulum*) hag ur parzh araok, ar rakgougorfenn (TA *adenohypophysis*); dre araez ar stimulinou ez aroulev ar c'hougorfenn un niver gwagrennoù enborc'hañ er bevedeg.
- hypophysectomie** ◇ **hypophysectomy** ◇ **gougorfennezvenañ** Dilemel surjanel ar c'hougorfenn.
- hypophysiotrope** ◇ **hypophysiotropic** ◇ **gougorfennwezher** aa. O werediñ war (ur parzh eus) ar c'hougorfenn.
- hypophysite** ◇ **hypophysitis** ◇ **gougorfennfo** g. Termen kinniget evit envel uswe gwagrennel ar c'hougorfenn hag an danijenn anezhi.
- hypophysoprive** ◇ **hypophysoprivic** ◇ **olgougorfennel** aa. A-zave da ezvezañ ar c'hougorfenn, goude ezvenañ.
- hypopinéalisme** ◇ **hypopinealism** ◇ **isvorc'hegezh** b. ar c'hourjadenn, **gourjadennisvorc'hegezh** b. Skorted arc'hwelerezh ar c'hourjadenn (sl. / *épiphyse*).
- hypopituitarisme, panhypopituitarisme, insuffisance antéhypophysaire, syndrome de Bickel** ◇ **hypopituitarism, panhypopituitarism** ◇ **skorted pe isvorc'hegezh** b. ar c'hougorfenn pe ar **rakgougorfenn** Strafuilhoù en arc'hwelerezh ar rakgougorfenn diwar isvorc'h un pe lies hormon: dic'halloud pe mizanliñv gant isteñv an organoù genel hag an divvronn; isteñv ar c'hroc'henn hag ar flugez gant kouezh ar blev, leiadur ar c'hennevid diazeaz, anilboued, iswask talmerel, gwadisvec'h glukoz, asikted gant ankewant ha direizhoù bred a-wechoù, o testiñ skorted ar gwagrennoù ganadel, skoedennel ha kaenuslounezhel, oc'h erzerc'haat pe marvenn ar rakgougorfenn goude ur gwilioud, pe amwask gant ur yoc'henn ebarzh- pe us-dibr (sl. *Sheehan : syndrome de ~, Simmonds : maladie de ~*).
- hypoplaquettose, thrombopénie, thrombocytopénie, thrombopénie** ◇ **thrombopenia, thrombocytopenia** ◇ **pladanisvec'h** g., **olpladanoù** g. Isniver ar pladanoù er gwad amredat dindan 150 000/mm³, o tec'han gwadliñvoù, dreist holl pa ziskenn ar feur dindan 50 000/mm³.
- hypoplasie ou hypoplastie** ◇ **hypoplasia** ◇ **iswe** g. 1 (Ster hollek) leiadur parañ ar gwiadoù. 2 (Ster dibarek) skorted diorreadur ur gwiad pe un organ.
- hypoplasie du cœur gauche** ◇ **hypoplasia of the left ventricle** ◇ **iswe ar c'hofig kleiz** Kammneuziad kalon o c'hoarvezout eus un anvoll mintrek pe aortek; direct eo ar c'hofig kleiz d'ur gavenn vannek; amredañ a ra ar gwad dre ar c'hentez kleiz, ar

c'hentez dehou dre ur c'hehentañ etre-kentezoù, ar c'hofig dehou, ar c'hef a-skevent, an aortenn dre ur san dalmerel dreistpad (sl. *canal artériel : persistance du ~, communication interauriculaire*).

hypoplasie rénale ◇ **renal hypoplasia** ◇ **iswe lounezhel, lounezhiswe** g. Kammneuziad c'hanedigel o c'hoarvezout eus isvent un pe an div lounezh e dianlen ur rizhell- pe ur c'hrouellnaoued; hervez ar furm e tiforc'her 1) al *lounezhiswe daoudu gant oligonefroniezh* pe *iswe oligomakronefronek* ma stader en ur ser isniwer an nefron hag usvent ar bloueigoù hag ar pibelloù, o tizhout ar magadelled, naouus ent klinikel dre c'hweladoù, terzhienn, ustroazh, dilerc'hiñ savder-pouez, marvus e mizioù pe e bloavezhioù kentañ ar vuhez, 2) al *lounezhiswe hanrannel*, alies untu, ma stader ul lounezh vihan, enni ur pebeilad lijorennoù reol ha kleñvedel, anvloueigel, hag ent klinikel, gant ar vugale, un uswask talmerel, an dedro o vezañ a-geñver gant astenned an anafoù.

hypopnée ◇ **hypopnoea** ◇ **isanal** g. Diouer ampled loc'hadoù an analerezh ha, dre se, leiadur gwenterezh ar skevent (sl. *apnée, bradypnée, dyspnée, hyperpnée, polypnée, tachypnée*).

hypoprosexie ◇ **hypoprosexia** ◇ **issip** g. Stad vred o c'hoarvezout eus blinded an evezh, lugud ar c'hounerezh, bouc'hded an dezeverezh (sl. *aprosexie, hypoprosexie*).

hypoprotidémie ◇ **hypoprotidaemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **protid, protidwadisvec'h** g. Leiadur feur ar protid er gwadvez e dianlen diread an tolz amredat anezho (diwar skorted a 'n enankadoù, misug koazhadel, strafuilh ar parañ gant an avu, adaverezh koazhadel pe lounezhel), pe da heul an dourwadusvec'h (sl. *dysglobulinémie*).

hypopyon, hypopion, pyophtalmie ◇ **hypopyon** ◇ **hipopion** g. Hogennad lin e-barzh kambr arak o vout lagad.

hyposémie ◇ **isec'heul** g. Diread an eztaolñ meidel, a stader gant ar velankoleion, al labaned, an envedion (sl. *amimie, asémie, asymbolie, hypermimie, hypomimie*).

hyposialie ◇ **hyoptyalism** ◇ **halvisvorc'h** g. Skorted borc'hañ an halv.

hyposidérémie ◇ **hypoferraemia** ◇ **gwadisvec'h** g. **houarn, houarnwadisvec'h** g., **olhouarn** g. **gwad, gwadolhouarn** g. L-eiadur feur an houarn er gwadvez, bezant en holl amwadoù dre negezh.

hyposodé, hyposodique ◇ **hyposodic** ◇ **isholenek** aa. A zo ennañ ul leiadur kloridenn natriom, sk. : *hanren isholenek* (Gl. *diète hyposodique*) (sl. *hypersodique*).

hyposomie ◇ **hyposomnia** ◇ **ishun** g. Skorted ar c'housted.

hypospadias ◇ **hypospadias** ◇ **hipospadias** g. Kammneuziad gant ar gourev, anezhi digorded hir pe hiroc'h ar c'han troazh war dalbenn izelañ ar c'halc'h (sl. *épispadias*).

hypostase ◇ **hypostasis** ◇ **ispoullañ, ispoullad** g. A-zivout ar gwad o hogennañ e parzhioù dianaou ar flugez er c'helan; er bev : gourwad dianaou diwar strafuilhoù an amredañ.

hyposthénie ◇ **hyposthenia** ◇ **iseniñv** g. Diouer nerzh bevedel, kadarni, deltu, embregusted, harzusted ouzh ar skuizhnez, asikted skañv (sl. *adynamie, athénie, endurance, hypersthénie, sthénie*).

hyposthénurie ◇ **hyposthenuria** ◇ **troazhisvec'hiusted** b. Diouer galloud al lounezh da vec'hiekaat an troazh.

hypotélorisme ◇ **hypotelorism** ◇ **enklagadegzh** b. Kammneuziad kloppendremmel naouus dre nester reñverek an daoulagad gant epikantuz, korrgloppenegezh, tourbennegezh ha skorted diorreadur kavenn ar genoù.

hypotenseur ◇ **1 hypotensive** **2 hypotensor, hypotensive agent** ◇ **1 iswaskeiat** aa. **2 iswaskeiad** g. -où **1** En araez da leiaat ar gwask talmerel. **2** Lia iswaskeiat (sl. *antihypertenseur, hypertendu*).

NOTENN : Ent strizh, e tiforc'her a) Gl. *hypotenseur* ha b) Gl. *antihyper-tenseur*; hiziv e tenner da arverañ an termen a) evel kenster d'an termen b).

hypotension ◇ **hypotension** ◇ **iswask** g. Leiadur ar gwask (talmerel, lagadel, enklouennel, h.a.); an termen *iswask*, arveret hep destier, a intenter evel *iswask talmerel*.

hypotension contrôlée ◇ **induced hypotension** ◇ **iswask dereet** Izeladur ar gwask talmerel gwezhet e-kerz oberatadennoù surjaniel 'zo (yoc'hennoù gwazhiedel en empenn, surjianerezh avendremmel) war-benn hepkoriñ ar gwadliñvoù treoberatael.

hypotension intracrânienne : syndrome de l'~ ◇ **intracranial hypertension** ◇ **azoniad an iswask enklouennel** Teskad ar strafuilhoù nerval ha bredel dec'hanet gant leiadur ar gwask enklouennel e dianlen un dourisvec'h muiek, ur fuadur liñvenn benn-kein dre frinaouez pe un amdreugañ a 'l liñvenn benn-kein; deraouiñ a reont dre ur gemmadenn neuzid, ur c'hlopennad, c'hweladoù, un dargud, alies ivez dre ur gwrester, un dourisvec'h ha strafuilhoù gwazhiedloc'hadel; da eil e tarvez un arluz, glizi, peluzioù hag ur c'homa marvus war verr dermen; an trepanañ-ezwanañ, en ur ziskuliañ an iswask er c'hambrou kostezel, a ro an tu da ensinklañ aer pe dileizhad kengrennek ha d'ober d'an azonou steuziañ (sl. *déshydratation, dérivation du liquide céphalorachidien dans l'hydrocé-phalie, trépano-ponction*).

hypotension orthostatique ◇ **postural hypotension** ◇ **iswask warsavel** Kouezh ar gwask talmerel pa vezer war-sav, o tec'han a-wechoù tolern ha vaganad (sl. *Shy et Drager : syndrome de ~*).

hypothalamiques : syndromes ~ ◇ **hypothalamic syndromes** ◇ **azoniadoù gouzerc'hvelel** Azoniadoù dec'hanet gant miarc'hwel gronnoù leur draoñ an trede kambr, en o zouez kreizennoù ar sec'hed, ar walc'hted hag ar gwrezarouleviañ, kennasket puilh gant ar reizhiad nervstruzhel hag o reoliñ dre o nervorc'hadoù arc'hwelerezh ar c'hougoufenn : strafuilhoù er c'hennevid

dourtredanel (diabet heuz, ansec'hed, azdalc'h dour ha natriom), e kennevid ar glukid hag al lipid (borrer, treuted), en emborc'herzh, dre reñver pe dre ziouer, ar stimulinou rakgougorfennel (kortiko-, gonado-, tireostimulinou, hormon somatotropek, prolaktin), mihun, mineuzid, h.a.; strafuilhoù holl e dianlen un darazek klopenn, un empennfo, ur pilhonfo a-ziaz, ur yoc'henn gefin (gougorfenn).

hypothalamus ◇ **hypothalamus** ◇ **gouzerc'hvel** g. Rannbarzh a 'n treuzempenn, anezhañ lodenn araok hag a-gof an trede kambr, kreizenn nervstruzhel hag emborc'hadel, o reoliñ gwezhierzh ar c'hougorfenn pergen.

hypothénar : **éminence** ~ ◇ **hypothénar (eminence)** ◇ **gouvozen** b. Balir kaherek hirvoan a-hed ribl diabarzh palv an dorn o c'hoarvezout eus kigennoù en erdu ar pempet biz (sl. *talon de la main, thénar : éminence* ~).

hypothermie ◇ **hypothermia** ◇ **iswrez** b. Izeladur gwrezverk ar c'horf pe ur parzh korf dindan 35°C.

hypothermie provoquée ◇ **induced hypothermia** ◇ **iswrez dereet** Gwezh ragoberatael, anezhañ izelaat ar gwrezverk kreiz dre yenaat ar gouziviad goude astaliñ e wikefreoù difenn (kridiennañ) diwar-bouez un dieraeciñ hollek, kurar pe hezerioù; dre hevelep araezad e vez leiaet an ezhommoù oksigen ha kevaraez ur spanaenn lec'hiek pe hollek an amred, amzer da ren gwezhadennoù disgwad (oberatadennoù kalon digor, surjianerezh an empenn) (sl. *hibernation artificielle, Shapiro et Williams : syndrome de* ~).

hypothyémie¹ ◇ **hypothyemia** ◇ **isnoa** g. Izeladur an noa, blindadur an eniñv gant tuadur d'ar gouvid (sl. *cyclothymie, dépression, hyperthyémie*¹).

hypothyémie² ◇ **hypothyism** ◇ **istoazonegezh** b. Skorted an toazenn, bezant en olteñvegezh an oad kentañ, e skorted c'hanadel ar vugeliezh hag e borrdieroù 'zo.

hypothyroïdie, hypothyroïdisme, hypothyroïse ◇ **hypothyroidism** ◇ **skoedisvorc'hegezh** b. Skorted borc'hañ ar skoedenn erzerc'haet dre furnoù gougel miksedom, an hini skañvañ anezho o vezañ *skoedisvorc'hegezh kuñv henek Hertoghe*; hervez an arbenn, e lakaer kemm etre ar s. *eilvedel*, diwar skorted ar c'hougorfenn, hag ar s. *kentael* ganedigal pe arzeuat; ar furn-mañ diwezhañ, ha hi ar baotañ, a vez dianlen pe d'ur skoedennfo unanhangael (miksedom isteñvel, kleñved Hashimoto), pe d'ur mezegadur (amiodaron, iod 131, litiom); ar prederiadur a c'hoarvez a *levotiroksin* e diounezadur pemdeziek (sl. *Hashimoto : goitre lymphomateux de* ~, *myxœdème*).

hypothyroxinémie ◇ **hypothyroxinaemia** ◇ **gwadisvec'h g. tiroksin, tiroksinwadisvec'h g.** Skorted ar feur tiroksin er gwad.

hypotonie ◇ **hypotonia** ◇ **istant g., istantegezh** b. Leiadur kleñvedel an tant (tennder padek, andiarvenn, e diazalc'h an nerveg, bezant er c'higennoù er paouez, Gl. *tonus, tonicité, Sz. tonus, tone, tonicity*) (sl. *hypertonie, contracture, tonus*).

hypotonie (osmotique) ◇ **(osmotic) hypotonia** ◇ **isgrenn** g. Stad ul liñvenn a zo ganti ur grenn (Gl. *pression osmotique*) izeloc'h eget grenn ul liñvenn all a-ziaostok ganti.

hypotonie osmotique du plasma : syndrome d'~ ◇ **syndrome of osmotic hypotonia of the plasma** ◇ **azoniad isgrenn ar plasma** Teskad azonoù diwar izeladur grenn ar plasma ha, da heul, an dourusvec'h kelligel o tarvezout e stadoù isvec'h ar c'hevionennoù plasmatek (natriom pergen), azoniad dec'hanet gant koll an holen (c'hweladoù, darc'hoal, skorted uslounezhel lemm) pe gant azdalc'h lounezhel an dour (skorted al lounezhi pe ar galon); anv a reer neuze eus *azoniad pistriadur dre an dour*, naouus dre an anilboued, an doñjer ouzh an dour, glebder glaourgen ar genoù, ar c'hweladoù, an troazhisvorc'h, ar gwadisvec'h natriom ha klor, ar gwadusvec'h urea, an asikted, ar glazoù, ar c'hloppennad, ar goabrennegezh, ar glizi hag ar c'homa a-wechoù; d'e brederiañ ez argrenner an euvriñ dour ha, diouzh ret, e tiounezer holen.

hypotonique ◇ **hypotonic** ◇ **1 1 istantek aa. 1 2 istantel aa. 2 1 isgrennek aa. 2.2 isgrennel aa.** 1 1 Gant an istant. 1 2 A-zave d'an istant. 2 1 Gant an isgrenn. 2 2 A-zave d'an isgrenn.

hypotrichose ◇ **hypotrichosis** ◇ **gouvlevegezh** b. Diouer kresk ar blev, lec'hiek pe hollek.

hypotrophie ◇ **hypotrophy** ◇ **1 disteñv g. 2 isteñv g. hollek, olteñv g.** 1 Diouer mezhour un organ o tec'han peurliesañ an dic'hwitadur anezhañ. 2 Diouer diorreadur ar bevedeg : eus *olteñv ar grouell* (Gl. *hypotrophie fetale*) e reer anv pa vez izel a-galz ar pouez ganedigezh; eus *olteñv ar vagadell* (Gl. *hypotrophie des nourrissons*) pa stader un *isvent savder-pouez* (Gl. *hypotrophie staturopondérale*), isventekoc'h ar pouez eget ar savder (sl. *atrophie, dysmature, hypertrophie*).

hypotropie, strabisme deorsumvergent, deorsumvergence ◇ **hypotropia** ◇ **iswariañ, loakrezezh g. iswar, iswarded** Loakrezezh diazerc'h naouus dre wariadur ul lagad war draoñ (sl. *ésotropie, exotropie, hypotropie*).

hypovascularisé ◇ **hypovascular** ◇ **iswazhiedet aao., iswazhiedek aa.** A zo isdiorreet ar gwazhied enañ.

hypoventilation pulmonaire ◇ **pulmonary hypoventilation** ◇ **iswentadur g. skevent** Leiadur ar c'hementad aer enanaet dre vunud e-barzh logigoù ar skevent ha, dre se, diouer oksigen e-keñver bevezadur ar bevedeg : devoudañ a ra leiadur ar feur oksigen ha muiadur ar feur CO₂ er gwad hag un akidoz analadel (sl. *hypocapnie*).

hypovitaminose ◇ **hypovitaminosis** ◇ **isvitaminegezh** b. Furn leiek an anvitaminegezh, kevredet a-wechoù gant negeziou all.

hypovolémie ◇ **hypovolaemia** ◇ **gwadisec'honad g.** Leiadur ec'honad hollek ar gwad amredat.

hypersrythmie, dysrythmie majeure ◇ **hypsarrhythmia** ◇ **hipsaritmiezh b., migorvez b. vuiek** Ezreolder an empennvarrwezañ : steuz ar gorvez vonan e gomid pikbaotou heled bras, ec'houbred hag hollek, kevret gant pikoù herrek pe gorrek, anadenn a stader liesañ e ser an andagoù plegañ (sl. *spasmes en flexion*).

hystérectomie ◇ **hysterectomy** ◇ **krozhevenañ** Lemel surjanel ar grozh e darn pe en holl, dre an “hent uhel” (*k. kofel*) pe dre an “hent izel” (*k. gouinel*); *k. klok* pa lamer ar grozh en he fezh, *k. damglok* pa lezer ar gouzoug.

hystérie ◇ **hysteria** ◇ **1 histeriezh** b. **2 darfell** g., **darfellegezh** b. 1 Keal a gaver e wrizioù en Henved koshañ (Egipt), assammet gant ar vezeion c’hresian (Hippokrates, Platon), a oa hini ul liamm etre ar grozh ha kleñvedoù ’zo a ’r beneved (hGr. ὑστέριος “histerek”); etre ar 17^t hag an 20^t kantved e strivad da azneveziñ intenterezh ar strafuilhoù dindan an anvad “hystérie”, “hysteria” (Sydenham, Mesmer, Charcot, Freud); hemañ diwezhañ eo a ginnigas evit an *Hysterie* un displegadur gouzuiel hag ur staelad etouez ar bredanaezioù, dre he rannañ e lies furm : *Angsthysterie* (*darfell enkreuz*) ma vez an arur an azon pennañ, *Konversionshysterie* (*darfell amdreiñ*) ma eztaol ar gouziviad e genniñv bred e rezh azonoù kreudel (peluz, aneraez, gostoù), *traumatische Hysterie* (*darfell daraezel*), h.a.; hiziv ne vez ket arveret nemeur an termen *hystérie*, *darfell* er Vezekniezh, en abeg d’ar c’hennotadur gwashaus hag ivez pa denner da erlec’hiañ un hanc’herieg bredkreudel ouzh prezeg ar Bredelfennerezh (sl. *névrose*).

hystérique ◇ **hysterical**, **hysterical** ◇ **1 darfellek** aa. **2 darfelleg** g. -eion **3 ~darfell**, **darfellek** aa. 1 Gant an darfell. 2 Gouziviad an darfell. 3 A-zave d’an darfell; *boull darfellek* (Gl. *boule* ou *globe* h.), anglevad ur c’horf estren o stankañ ar gorzailhenn; *personelezh darfellek* (Gl. *personnalité* h.), neuzid naouus dre ur goulenn karantez grizias, un dec’hmegerezh gourfaot, ur c’hourc’hizidigezh hag ur c’houreztaolidigezh (sl. *histrionisme*).

hystéroçèle, **métroçèle** ◇ **hysterocele** ◇ **krozhogad** g. Avelenn ar grozh.

hystérocléisis ◇ **hysteroclieisis** ◇ **krozhanforzhañ** Oberatadenn gwezhiet pa vez ur fic’h krozh-c’hwezhigell, anezhi krafaelañ div vriell gouzoug ar grozh d’ober da wad ar mizioù diverañ dre ar c’hwezhigell.

hystérogaphie ◇ **hysteroigraphy** ◇ **krozhluniñ** Skinluniñ ar grozh goude ensinklañ enni un Xdemerenn.

hystéromalacie ◇ **hysteromalacia** ◇ **krozhvlodad** g. Boukadur ar grozh en ervez da zec’han ar fregadur anezhi e-kerz ar gwilioud.

hystérométrie ◇ **hysterometry** ◇ **krozhventañ**, **krozhventerezh** g. Kateteriñ kavenn ar grozh gant ur c’harenn dereziet metal pe mezell (*krozhventer*, Gl. *hystéromètre*) war-benn anaout ar mentoù, ar furm hag ar gizidigezh anezhi.

hystéropexie ◇ **hysteropexia** ◇ **krozhaanlenañ** 1) Festañ ar grozh ouzh speur arak ar c’hof evit dizarbenn un drekplegad pe un izad (*k. kofel*, Gl. *h. abdominale*) pe 2) festañ gouzoug ar grozh ouzh speur adreñv ar gouin evit dizarbenn un drekc’hwelad pe un drekplegad (*k. gouinel*, Gl. *h. vaginale*).

hystéroplastie ◇ **uteroplasty** ◇ **krozhatelviñ** Dazluniañ surjanel ar grozh.

hystéroptose, **métroptose** ◇ **hystéroptosis**, **hysteroptosis** ◇ **islink** g. ar **grozh**, **krozhislink** g., **izad** g. ar **grozh**, **krozhezad** g. Rikladur war draoñ a ’r grozh da heul laoskred an araezioù festañ anezhi; kevredet e vez bepred gant ar gouinogad, alies gant ar c’hwezhigelload a-wechoù gant ar youlc’hogad; alies n’eus nemet gouzoug ar grozh a vez islinket (*gouzougogad*) (sl. *colpocèle*, *cystocèle*, *prolapsus*, *ptose*, *rectocèle*, *trachéoptose*).

hystéroscope ◇ **hysteroscope** ◇ **krozhengweler** g. -ioù, **histeroskop** g. -où Endoskop (luc’hwereer) a ebarzher dre ganol ar gouzoug evit engweliñ, luc’hskeudenniñ pe filmañ kavenn ar grozh diwar-bouez ul luc’honi.

hystéroscopie ◇ **hysteroscopy** ◇ **krozhengweliñ**, **krozhwereañ** Imbourc’hiñ kavenn ar grozh dre araez un histeroskop.

hystérotomie ◇ **hysterotomy** ◇ **korzhenbenañ** Digeriñ surjanel kavenn ar grozh dre ur flañchadenn a-dreuz, a-zerc’h, a ’r c’horf pe a ’r strizh.

I

iatrochimie ◇ **iatrochemistry** ◇ **iatrokimiezh** b. Hendoazhadur mezegel o tisplegañ holl zevoudoù ar beved, bonan pe gleñvedel, dre weredoù kimiek evel ar goiñ, an alkaliegezh, ar strilhañ, ar bouilh, an aezhidikaat, h.a.

iatrogénique, iatrogène ◇ **iatrogenic** ◇ **mezegien** aa. A-zivout un anaezad, devoudet gant ar mezeg pe ur brederiadenn, da skouer un angreizh stomok e dianlen un diounezad kortikoidoù.

iatrophysique ◇ **iatrophysics** ◇ **iatrofizik** g. 1 Hendoazhadur mezegel oc'h ober meiz war an holl zevoudoù bevedel dre anadennoù fizikel. 2 Termen arveret da arouezñ ar fizik dedalvezet d'ar vezekniezh.

ichtyose, ichthyose ◇ **ichthyosis** ◇ **iktioz** g. Mideñv kroc'hen hêrezhel treuzkaset er mod trec'hek pe enkilek hervez ar furmoù, oc'h anadiñ e-kerz mizvezhioù pe vloavezhioù kentañ ar vuhez e rezh ur c'hroc'hen sec'h ha goloet gant gourc'hennoù moan heñvel ouzh skant ar pesked, astennet d'ar c'horf a-bezh nemet an dremm, ar plegoù, ar palvoù hag ar solioù (*i. skoedigel* pe *naervanek*, Gl. *i. scutulaire* pe *serpen-tine*); en *i. kornvanek* (Gl. *i. cornée*) e vez ledan ha tev ar gourc'hennoù, o tennañ da skant ar saorianed (*saoriarez*) pe da bikoù an daredeged (*i. hystrix*).

ichthyosisme ◇ **ichthyotoxism** ◇ **iktiozegezh** b., **peskpistriegezh** b. Teskad an darvoudoù pistriel e dianlen euvridigezh pesked 'zo fresk pe miret (pesked pistrus drezo o unan pe dre o magadur) pe pesked o vreinañ.

icron ◇ **icron** ◇ **ikron** g. Termen kinniget gant Blumberg diwar bennlizherennoù *Institute for Cancer Research*, evit arouezñ an unvez amparet gant ur viruz ha parzhiadoù o tont eus e herberc'hier; e se, goloenn viruz an avufo B, sellet evel an antigen Aostrelia, zo enni antigenoù amprestet digant ar gouziviad a ro bod dezhañ; pa ento hevelep viruz en ur gouziviad all na biao ket antigenoù a seurt gant ar re o tont eus an herberc'hier kentañ, ez erwezh feuls an herberc'hier nevez dre barañ antikorfoù ha diwar ar c'henniñv hangaeel-se e tisoc'h un avufo lemm, grevus, na c'hell parañ nemet dre zistruj ar viruz; en eheb, mar bez an antikorfoù bezant endeo en eil gouziviad, ne vez gantañ erwezh difenn ebet hag e c'hoarvez ur pore diazon; un trede degouezh ez eus : pa na vez nemet ur gerentiezh antigenel darnel etre an ikron hag an danvevad nevez, ez erwezh hemañ dre barañ antikorfoù dourennel hag anadennoù hangae kelligel handizhek : aloubet e vez an avu gant kelligoù hangaec'hougou ha deroù zo da zedro un avufo henek gwezhius (sl. *cellules, immunocompétentes, hépatite B, hépatite chronique, hôte, immunité*).

ictère, jaunisse ◇ **jaundice, icterus** ◇ **ikter** g. -où, **januz** g. Azon o c'hoarvezout eus ul livrezh melen doues pe douesoc'h a 'r c'hroc'hen hag a 'r glaourgennoù dre berzh intradur ar gwiadoù gant ar bilirubin; anv a reer eus *ikter fraezh* pa sav feur ar bilirubin dreist 30 mg/l (51 µmol/l) er plasma, eus *gouikter* pa vez ar feur etre 10 ha 30 mg/l (etre 25 ha 51 µmol/l).

ictère à bilirubine conjuguée, ictère cholurique, ictère par régurgitation ◇ **regurgitation jaundice, resorptive jaundice** ◇ **ikter gant bilirubin keveilet, ikter troazhvestlel, ikter assugadel** Ikter diwar hogennadur ar bilirubin keveilet er gwad; livegennoù bestlel a gaver en troazh; peurliesañ e tistro d'ar gwad parzhiadoù all ar vestl gant ar bilirubin : an *ikter dre vestlanred* eo, dre steviadur forzhioù degorzhañ ar vestl, ken enavuel, ken ec'havuel; amglok e vez an anred e tro an avufoioù hag ar c'hirrozioù, klok e degouezh ur c'hankr pe pa vez peursteviet ar san vestl gant ur c'hrouanenn; dibaotoc'h, dre ziuver un enzym, pa na vez ket ar gellig avu evit degorzhañ ar bilirubin keveilet ha pa dremen hemañ er gwad (*ikter Dubin-Johnson, azoniad Rotor; Manahan ha Florentin*).

ictère à bilirubine libre ou non conjuguée, ictère acholurique ◇ **retention jaundice, acholuric jaundice** ◇ **ikter gant bilirubin ankeveil, ikter troazhanvestlel, ikter azdalc'hadel** Ikter naoues dre ezvezañs al livegennoù bestlel en troazh ha gwadusvec'h ar bilirubin ankeveil; hemañ, dourandileizh, ne vez ket degorzhet gant al louezhi met treuzfurmet en urobilin ezvennet en troazh; un ikter skañv eo, dezhañ lies arbenn : e par ar c'helligoù ruz, an distruj reñverek anezho o tevoudañ un usvec'h bilirubin (*ikter gwadloezadel*) pe ezreolderioù en o furmidigezh (*amwad Biermer, moramwad*), e par ar gellig avu dic'houest da geveilañ ar bilirubin e diouer an enzym rekis; dibad e c'hell bezañ an divigad enzimatek, evel en *ikter an nevezc'hanidi*, pe diwezhel, klok evel en *ikter ganedigel Crigler ha Najjar*, pe diglok, evel e *gwadvestlegezh familhel Gilbert* (sl. *anémie pernicieuse, bilirubinémie, cholémie familiale, thalas-sémie*).

ictère épidémique ◇ **rechute** ◇ **epidemic jaundice with relapsing fever** ◇ **ikter pe januz darreuziat azkouezhus** Ikter poreel kuñv, tredizhus, o teraoiñ dre ur stad gripel, o padout un dek devezh, oc'h azkouezhañ lies gwech er sizhunvezhioù da heul, kevret gant usvent an avu hag ar felc'h hag o tedeiñ etrezek ar pare dindan un nebeut mizvezhioù; ur furm eo eus an avufo A (sl. *hépatite A*).

ictère grave familial du nouveau-né, maladie de Pffannenstiel ◇ **familial icterus gravis neonatorum, Pffannenstiel's syndrome** ◇ **ikter familhel grevus an nevezc'hanidi, azoniad Pffannenstiel** Ikter oc'h anadiñ un nebeut eurvezhioù goude ar c'hanedigezh, kevret gant koeñvadur an avu hag ar felc'h, morvor, gwadliñvoù, amwad hag eritroblastoz, o tedeñ d'ar marv hogos bepred; ur furm eo da gleñved gwadloezadel an nevezc'hanidi.

ictère grave ou malin ou typhoïde, fièvre jaune nostras ◇ **malignant jaundice, icterus gravis or typhoides** ◇ **ikter grevus pe tifoidel, januz yud, terzhienn velen du-mañ** Azoniad naouus dre un ikter, anadennoù nerval (morgud ha koma da heul), gwadliñvoù ha daralladur don ar stad hollek gant iswrez, dedro herrek d'ar marv; eilvedel e c'hell bezañ d'ur pore (leptospiroz iktergwadliñvel, terzhienn velen, tifoid, gwadlestegezh, h.a.), d'ur pistriadur (fosfor, amanit falloidel, halotan, h.a.), d'ur c'hleñved avu (avufo viruzel, avufo rurek pergen); erzerc'haat a ra un *isvent melen lemm an avu* (Gl. *atrophie jaune aiguë du foie*) (sl. *hépatite fulminante*).

ictère hémolytique ◇ **haemolytic jaundice** ◇ **ikter gwadloezadel** Ikter skañv diwar un distruj a-vloc'h a 'r c'helligoù ruz e-barzh ar felc'h, gant felc'husvent hag amwad, hep haliou bestlel en troazh; div furm a zeskriver dezhañ : 1) an *i. g. ganedigél* pe *sferokitoz ganedigél* pe *azoniad Minkowski-Chauffard*, e dianlen breskted c'henezhel ar c'helligoù ruz, treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, naouus dre un ezreolder e proteinou koc'henn an hemati ha leiadur an harzder grennel anezho, 2) an *i. g. arzeuat*, e dianlen ar vezañs er plasma eus ur *barenn geuzañ an hemati (hemolizin)*, a) degaset gant ur bistrionn, ur bakteri, un arvevad, b) dinodet da heul erwezhoù hangaeel darvezet e-kerz ar grouellvezh (hangaeañ unspesadel : kleñved gwadloezadel an nevezc'hanidi, eritroblastoz ar grouell) pe, diwezhatoc'h (unanhangaeañ) (sl. *anémie hémolytique, auto-immunité, hémolyse, hémolysine, sphérocytes*).

ictère nucléaire du nouveau-né, kernictère ◇ **nuclear icterus or jaundice, Schmorl's jaundice** ◇ **ikter gronnel an nevezc'hanidi, gronnikter** Azoniad a stader gant an nevezc'hanidi hepken, pa vezont tizhet gant an *ikter familhel grevus*, naouus ent neuziadurel dre zaralladur gronnoù louet diaz an empenn, ent klinikel, ouzhpenn livezh ar januz, an trec'hwez, an anilboud, un ankewant hollek, ustant kahelel gant dreistastennadur an askil, loc'hadoù atozek, ur c'homa hag un dedro d'ar marv dindan un nebeut devezhoù; e degouezhoù dibaot kaer e c'hoarvez ar pare, nemet a briz un dilerc'hegezh vredloc'hadel ha dasstrizhegezh an izili; ar pep liesañ e klot an azoniad gant ur furm eus kleñved gwadloezadel an nevezc'hanidi, a-wechoù avat e vez delanket gant un avufo viruzel pe ur migennevid a 'r bilirubin; devoudet eo gant pistrigezh ar bilirubin ouzh empenn an nevezc'hanidi (empennaoued gwadvilirubinel).

ictère physiologique, ictère simple du nouveau-né ◇ **icterus neonatorum, jaundice of the newborn, physiologic jaundice** ◇ **ikter pe januz bonan, ikter pe januz eun an nevezc'hanidi** Ikter dibad a stader d'ar c'hanedigezh gant ar rakkoulzeon ha gant an hanter eus an hegoulzeon, e dianlen ezvezañs tremeniat un enzim rekis da dreuzfurmiñ ar bilirubin ameeun (ankeveil) e bilirubin eun (keveilet) dre ma n'he deus ket ar gellig avu gounezet he holl varregezhioù arc'hwelel.

ictérigène ◇ **ictogenic, icterogenous** ◇ **iktoreiat** aa. O tevoudañ an ikter.

ictérique ◇ **icteric** ◇ **1** ikterek **2** iktereg g. -eion **3** ikterel aa. 1 Gant an ikter. 2 Gouziviad an ikter. 3 A-zave d'an ikter.

ictéro-ascitique : syndrome ~ ◇ **icteroascitic syndrome** ◇ **azoniad iktertorliñvel** Azoniad en ervez da zinodiñ gant ur gouziviad a 'r c'hirro, naouus dre un ikter fraezh hag, un nebeut devezhoù goude, un torliñv hag un daralladur herrek a 'r stad hollek (treutadur, terzhienn, purpura); azoniad oc'h erzerc'haat a-wechoù ur resmiad dic'henezhañ behinek a 'n avu (sl. *dégénérescence graisseuse*).

ictéro-œdémateux : syndrome ~ ◇ **ictero-edematous syndrome** ◇ **azoniad iktergouliñvel** Azoniad dibaot en ervez da zinodiñ gant ur gouziviad a 'r c'hirro, naouus dre un ikter fraezh ha, da heul, gouliñvoù muiek, test d'ur resmiad dic'henezhañ a 'n avu (sl. *dégénérescence graisseuse*).

ictus ◇ **ictus, stroke** ◇ **orc'had** g. Nep erzerc'had kleñvedel o tarvezout trumm (sl. *accident vasculaire céré-bral, apoplexie, attaque, fugue, vertige laryngé*).

ictus amnésique ◇ **transient global amnesia** ◇ **orc'had ankoun** Barrad o padout un nebeut eurvezhoù, dezhañ un deroù hag un dibenn trumm, naouus dre un ankoun eus an devoudoù bep ma c'hoarvezont (ankoun dienezat) endra van reol realezh ar gouziviad a hent all; goude an orc'had ne chom eñvor ebet eus ar pezh a zo bet; peurliesañ e tarvez an *o. a.* goude c'hwegont vloaz ha ne zegouezh nemet ur wech; kuñv eo an erdeb; dianav an arbenn anezhañ — dindan gevarguz e chom ur miarc'hwel e rannbarzh ar pennmarc'hig (sl. *amnésie, attaque*).

ictus laryngé ◇ **cough syncope** ◇ **orc'had garloc'hennel, ezwal g. pasaat** Ezwal devoudet gant ur barrad paz taer ha hir, a zispleger dre an uswask enbruskel o skoilhañ ouzh distro ar gwad gwazhiennel d'ar galon.

ictus médullaire, apoplexie spinale ◇ **spinal apoplexy** ◇ **orc'had ar mel, orc'had livennel** Doned feuls un treuzzeizi pe ur pevarzeizi da heul un darvoud gwazhiedel trumm e par ar mel a-livenn (gwadliñv pe steviadur un dalmerenn).

idéatoire ◇ **ideational** ◇ **~arverañ, arveradel** aa. A-zivout ar fiñvadoù diarvenn trazeat, eleze oc'h angorzhañ traezoù, evel distouvañ ur voutailh (sl. *apraxie idéatoire, idéomoteur*).

idée délirante ◇ **delusional idea** ◇ **mennoz g. ambreek** Mennoz faos goustennet gant ur c'hantaezañ angerzhek andistrec'h a skoilh ouzh an dasselliñ, an dezvarn hag an dereizhañ; e zespiñ a reer evel erzerc'had an *dezeverezh antraek* (Gl. *pensée déréistique*) (sl. *délire*).

idée d'influence, syndrome d'action extérieure ◇ **idea of influence, passivity feeling** ◇ **mennoz pe anglevad g-enkrog** A-berzh ar gouziviad, dergoaliñ bezañ dindan galloud un hennad amgen o ren war e zezevou, e gantaezadou, e realoù, o c'hougorañ dezhañ kement a soñj, a anglev, a lavar, a embreg (sl. *automatisme mental, influence : idées d'~*).

idées : fuite des ~ ◇ **flight of ideas** ◇ **diflip g. an devezoù** Strafulilh ar prezeg e rezh un heuliad fourradus didorr a brepozioù hep keñver gant ar blegenn, hep kantalc'h poellel, hep liamm etrezo estreget advantoù stered pe sonel, o vont alies betek an dislen; unan eus azonoù pennañ ar mania; un arvez eus diflip an devezoù eo ar froudareizhañ (sl. *euphorie, logorrhée, manie*).

idées de négation ◇ **negation feelings** ◇ **mennozioù anrevoud** Azon bredanaezioù 'zo (melankoliezh pergen), anezhañ haerñ steuzidigezh un pe lies organ, ar c'horf a-bezh hag ar bed e unan, ambren kevredet alies gant anglevadoù ramzegezh, peurbadegezh, kablusted, daonedigezh, o vont d'ober neuze *azoniad Cotard* (sl. *hypocondrie*).

idées de persécution ◇ **feelings of persecution** ◇ **mennozioù heskinadur** Dergoaliñ ambreek bezañ en ardizh mennadoù hag oberoù galen (divrudañ, kontammañ, sorsañ, muntrañ) a-berzh un den pe tud anav pe dianav; pa vez trevnet ar mennozioù heskinadur e rezh ur reizhiad kempoell, e wiskont furm un *ambren baranotak* (sl. *délire, paranoïa*).

identification ◇ **identification** ◇ **hevelebiñ, emhevelebiñ** (Bredelfennerezh) argerzh bred ma piaoueka drezañ ar gouzrec'h un arvez, ur perzh eus an amgen ha ma emdrezfurm diwar ar patrom-se.

ident-

• *cellules génétiquement identiques* kelligoù hilunglad • *identificateur numérique* naoudi niverel • *identifier un cadavre* pivadiñ ur c'helan • *identifier une espèce* hennadiñ ur spesad • *identitaire, identitariste* hevelebour • *identité diachronique* hevelepted treadegel, treünded • *l'ADN suffit-il pour déterminer l'identité?* ha spirus eo an DNA evit savelañ ar bivelezh? • *la personnalité se constitue et se différencie par une série d'identifications* amparet ha diforc'hekaet e vez ar bersonelezh diwar-bouez ur steudad hevelebadurioù • *les deux gènes sont identiques* unrezh eo an div c'henenn • « *soi* » n'est pas synonyme d' « *identité biologique* » « unevedd » n'eo ket kenster da « hevelepted vevedl ».

idéomoteur ◇ **ideomotor** ◇ **~argelañ, argeladel aa.** A-zivout ar fñvadoù diarvenn antrazeañ, eleze na angorzhont ket traezoù, argelek (ober sin ar groaz), pe darvanek (ober van da c'hoari violoñs) (sl. *apraxie idéomotrice*).

idioglossie ◇ **idioglossia** ◇ **handeodiñ** Mouezhparañ naouus dre ec'hodadur sonioù na gaver ganto naouuster ebet eus ul lavar, anadenn a stader gant ar vabaned ha labaned 'zo.

NOTENN : Kemm a lakaer etre an *handeodiñ* hag an *amdeodiñ* (Gl. *glossolalie*), hemañ diwezhañ o vezañ ur gaoulavar, amparet gant soniadoù yezhel, dezhañ neuz ur yezh, met dreist intent (sl. *glossolalie*).

idiopathique, essentiel ◇ **idiopathic, essential** ◇ **hennadek aa.** Adanvioù kinniget gant ar c'hemeradur "oc'h amparañ un unvez nozologek, a-gevenep da *azoniek*", arveret hiziv evel kevatal da *kelardarzh* (Gl. *crypto-génétique*), eleze "a-zivout un anaev n'eur ket deuet a-benn c'hoazh da zizoleiñ an natur pe an arbenn anezhañ" (sl. *cryptogénétique, essentiel, symptomatique*).

idiophagédénisme, phagédénisme géométrique, pyoderma gangrenosum, phagedena geometrica ◇ **idiophagedenism, phagedena geometrica, pyoderma gangrenosum** ◇ **idifogedenegezh aa., phagedena geometrica b., pyoderma gangrenosum g.**

idiosyncrasie, idiocrasie ◇ **idiosyncrasy, idiocrasy** ◇ **emaoz b., idiosinkraziezh, idioikraziezh** Termenoù dispredet oc'h arouezñ an doare enganet en deus pep hinienn da erwezhañ ent dibarek ouzh delanvadoù ar metoù; keal mennet d'ober meiz war gizidigezhioù kevarall ar c'houziviaded ouzh an un antigen.

idiotie, idiotisme ◇ **idiocy, idiotism** ◇ **diodezh b.** Termen dispredet (nemet evel kedrann en anvad anaevioù dibarek 'zo), bet erlec'hiet outañ *dilerc'hegezh don* (sl. *arriération profonde, imbécillité*).

idiotie amaurotique familiale ◇ **amaurotic familial idiocy, maculocerebral degeneration** ◇ **diodezh steuzwelel familhel, dic'henezhadur brizhennempennel** Anvad ur stroll dilerc'hegezhioù hêrezhel kevredet gant anafoù deun al lagad diwar un namm hilel treuzkaset er mod enkilek, naouus dre zic'henezhadur kelligoù an nervreiziad kreiz aloubet gant gangliozidoù (sl. *gangliosidose*).

idiotope ◇ **idiotope** ◇ **idiotop g. -où** Hanload antigen (Gl. *déterminant antigénique*) loet war al lodenn argemmus eus ar molekul antikorf.

idiotype ◇ **idiotype** ◇ **hanrizheg g. -où, idiotip g.** Immunoglobulin (Ig) a zo bet daskemmet an naouuster spesadel anezhañ dre geraez un antigen (staladur nevez an amindrenkennoù ouzh e ober); kevarall eo aet enta d'ar seurtadoù Ig a un spesad gantañ dre e zazgwered ouzh an antigen; an *i*. a c'hoarvez enta eus teskad an idiotopoù, pe hanloadoù antigen spesadel, loet war lodenn argemmus ar molekul antikorf (sl. *allotype, isotype*).

idiotypie ◇ **idiotypy** ◇ **hanrizh g., idiotipiezh b.** Argemmusted e spesadelezh hag e luniadezh un immunoglobulin (Ig) da heul keraez un antigen, alese ar gevarallded anezhañ d'ar seurtadoù Ig a un spesad gantañ (sl. *allotypie, isotypie*).

idioventriculaire ◇ **idioventricular** ◇ **hangofigal aa.** Piaouel d'ar c'hofig; *korvez hangofigal* (Gl. *rythme idioventriculaire*) a reer eus ur gorvez gorrek ha reoliek (etre 40 ha 50 lamm dre vunud) piaouel d'ar c'hreizkennoù kofigal emgenn ar galon; darvezout a ra pa vez un tolc'had kentez-kofig klok (poulz gorrek trebadek) (sl. *pouls lent permanent*).

iléite régionale ou terminale, maladie de Crohn ◇ **regional or distal or terminal ileitis, Crohn's disease** ◇ **klunegenno g. rannbarzhel pe pellek pe dibennel** Tanijenn angreizhek hag isvullus en ur rann eus ar vouzellenn voan, hogos

bepred el lodenn dibenn, kevret a-wechoù gant ur c'holonfo; stadañ a reer un uswe muiek eus ar bolc'hennoù limfoidel hag ar gwerblennoù; anaez o teraouiñ peurliesañ etre 20 ha 40 vloaz en un doare lemm pe goulemm hag o vont diouzh un dedro henek, falezhus, gant darc'hoal dalc'hus, gouantreizh ha linadur; dianav eo an arbenn anezhañ.

iléo-iléostomie ◇ **ileo-ileostomy** ◇ **dasforzhañ klunegenn-klunegenn** Pennegiñ kenetrezo daou gilbleg eus ar glunegenn.

iléocolostomie ◇ **ileocolostomy** ◇ **dasforzhañ klunegenn-kolon** Pennegiñ ar vouzellenn voan ouzh ar vouzellenn dev.

iléopathie segmentaire œdémateuse, entéropathie allergique, œdème segmentaire du grêle ◇ ◇ **klunegennaoued g. hanrannel gouliñvus, klunegennaoued allergek, gouliñv hanrannel ar vouzellenn voan** Anaez allergek naouus *ent neuziadurel* dre goevvadur gouliñvel un hanrann eus ar vouzellenn voan hag ar gandedenn anezhi, *ent klinikel* dre un antreizh pervez lemm, a bareer dre ur prederiadur histamindolc'her.

iléoportographie ◇ **ileoportography** ◇ **pervezporzhuniñ** Skinluniñ kef ha barroù ar wazhienn borzh goude ensinklañ un demeraer en ur wazhienn eus ar pervez bet kateteret e-kerz ur gwezh surjanel.

iléorectostomie ◇ **ileorectostomy, ileoproctostomy** ◇ **dasforzhañ klunegennyoulc'h** Pennegiñ ar vouzellenn voan ouzh ar youlc'h, gwezh ergemennet e degouezh kankroù anoberatadus ar vouzellenn dev.

iléostomie ◇ **ileostomy** ◇ **klunegennforzhañ** Savelañ un adfraezh surjanel diwar lodenn diwezhañ ar vouzellenn voan.

iléum TA, iléon ◇ **ileum** ◇ **klunegenn b.** Lodenn dibenn ar vouzellenn voan o kenderc'hel ar yunegenn ha kendalc'het gant ar sac'henn.

iléus ◇ **ileus, intestinal obstruction** ◇ **stoc'had g.** Antreizh pervez lemm pe henek; hervez ar wikefre, e tiforc'her : 1) ar *stoc'had bestlel* (Gl. *iléus biliaire*, Sz. *ileus by impacted gallstone*), diwar ur c'hrouanenn vestl skoilhet e-barzh oaled ar pervez; 2) ar *s. dialuskel* pe *dasstrizhel* (Gl. *i. dynamique*, Sz. *dynamic i.*), diwar un andag a 'r pervez, 3) ar *s. treloc'hel* (Gl. *i. mécanique*, Sz. *mechanical i.*), e dianlen pe a) brevadur ar pervez hag e wazhied (*s. dre dagelladur*, Gl. *i. par strangulation*), pe b) stankadur oaled ar pervez gant ur c'horf estren pe un isvoll (*s. dre steviadur*, Gl. *i. par obturation*); 4) ar *s. mekoniel* (Gl. *i. méconial*, Sz. *meconium i.*), antreizh pervez an nevezc'hanidi diwar chagadur ar mekoniom e-barzh ar yunegenn, furm gentratañ ha grevusañ ar mukoviskidoz, 5) ar *s. peluzel* (Gl. *i. paralytique*, Sz. *adynamic i.*), diwar astal an amdonnegezh.

iliaque ◇ **iliac** ◇ **a-glun** A-geñver gant *askorn ar glun* (TA & Sz. *os ilium*, Gl. *ilium*), sk. : *kigenn a-glun* (TA *musculus iliacus*, Gl. *muscle iliaque*), *talmerennoù a-glun*, (TA *arteriae iliacae*, Gl. *artères iliaques*).

iliopsoïte ◇ **iliopsoïtis** ◇ **loanklunfo g.** Tanijenn ar *gigenn loan-klun* (TA *musculus iliopsoas*, Gl. *iliopsoas*).

ilium (anvad kent : **ilion**) ◇ (TA & Sz. **os ilium**) ◇ **askorn g. ar glun** Lodenn grec'h *askorn al lez* (Gl. *os coxal*), ouzh he ober ar c'horf, o kemer perzh e neuziadur ar *bodenn* (TA *acetabulum*, bet Gl. *cavité cotyloïde*) hag an askell a zo he bevenn *kribenn ar glun* (Gl. *crête iliaque*) (sl. *coxal* : *os* ~).

illusion ◇ **illusion** ◇ **kammzerc'hañ, kammzerc'h g.** Gwariadur ar merzhout, un arbenn anezhañ o vezañ a) pe en traoù, evel ar pleg a weler gant ar vazh soubet en dour, b) pe er skiantennoù : mar kroazier biz kreiz ha biz yod un dorn ha mar lakaer etrezo ur ganetenn, e kreder merzhout div ganetenn (*kammzerc'h Aristoteles*), c) pe en emanglevoud : an den, bet ambidet e vrec'h outañ, o kenderc'hel da verzhout an ezel ezvezant (*ezel tasmant, kammzerc'h an ambideion*); diforc'h a lakaer etre ar c'hammzerc'h, *fazi merzhout*, hag an trezerc'h, *asvan merzhout* (sl. *halluci-nation*).

illusion des sosies ou délire d'~, syndrome de Capgras ◇ **illusion of "doubles", Capgras delusion** ◇ **ambren b. an unkenioù, azoniad Capgras** Pivadiñ un nesaour en ur haerñ n'eo ket eñ a zo erouez met an *unken* anezhañ, strafuilh a zispleger dre an distroll etre ur c'hantouezañ reol hag un *andenaoud kantaezadel*, hag a seller evel ur furm eus an *distreüniñ* hag un azon gwirheñvel a skizofreniezh (sl. *dépersonnalisation*).

NOTENN : Ankevazas eo arver Gl.Sz. *illusion* amañ; ned eo *ambren an unkenioù* nag ur c'hammzerc'h nag un trezerc'h, met un amparadur kleñvedel a 'n ergerc'henn, eleze un daralladur a 'n ergerc'hañ; greomp anezhañ ur *miergerc'h* betek piaouañ ur rummidigezh kevanaus.

îlot

- *îlots chondromateux* enezigoù kondromatus
- *îlots de calcification* enezigoù razekadur
- *îlots de Langerhans* enezigoù Langerhans
- *tissu conjonctif semé d'îlots épithéliaux* gwiad kenglenel, strewet ennañ enezigoù epitelel.

image

- *image en coupe, coupe* skeudenn a-skej
- *image radiologique* skeudenn skinlun
- *mouvements et images figurés par les doigts* fiñvadoù ha delvadoù ar bizied
- *percevoir sa propre image* merzhout an derc'h an unan
- *post-image* dianlouc'h
- *radiographie, échographie, imagerie nucléaire* skin-, sten-, derc'hanwereañ.

imagerie médicale ◇ **medical imaging** ◇ **skeudennerezh g. mezegel** Diskiblezh an araezadoù fizikel engwezhet evit skeudenniñ ergorennoù loet e diabarzh ar c'horf; kentradet e 1895 gant W. K. Röntgen e rezh ar skinluniñ, ne baouez ket, abaoe 60 vloaz dreist holl, a gempleshaat he c'halvezderioù hag a astenn maezienn he arloadurioù; ar re-mañ a ranner hiziv etre div dachenn : ar *skeudennerezh neuziadurel* (Gl. *imagerie anatomique*), oc'h amelañ an deznauoñ dre zinoñ an anafoù hag an ezreolderioù korfadurel, ar *skeudennerezh arc'hwelel* (Gl. *imagerie fonctionnelle*), amkanet da studiañ arc'hwelerezh an organoù; an hentenn goshañ ha bepred an arveretañ eo ar *skinluniñ* (Gl. *radiographie*); un arwellad anezhañ e voe an *haenluniñ* (Gl. *tomographie*); ar c'halvezderioù nevesañ eo an *dasson gwarellec'herc'hanel* (Gl. *résonance magnétique nucléaire*), ar *skinerluniñ* (Gl. *scanner*),

scanographie), ar *skingannluniñ* (Gl. *scintigraphie*), ar *stenerluniñ* pe *stenerweañ* (Gl. *échographie*) hag un askenad eus hemañ, an *dopler* pe *herrventerezh Doppler*, araez da vuzuliañ herr diver ar gwad; e-touez amkanioù an imbourc'h kempredel emañ an araokaat eus *kizidigezh an dinoroioù* evit leiaat read ar skinoù ha dre se ar riskloù anezho evit ar gwiadoù skinataet, eus *og teirmental* (Gl. *définition spatiale*) ar skeudennoù hag eus *korvoadur an arhentoù* (Gl. *exploitation du signal*) : endra vez gouest lagad an den da zigemmañ 100 live louet etre ar gwenn hag an du, ez eo barrek erc'hwilierezh an arhentoù ameiñ dre urzhiataer da ziforc'hekaat 4000 live (sl. *Doppler : examen* ~, *échogra-phié*², *IRM, radiographie, résonance magnétique nucléaire, scanographie, scintigraphie, tomographie*).

imaginaire ◇ **imaginary** ◇ **1 dec'hmegadel aa. 2 drec'hel aa. & g.** 1 A-zave d'an dec'hmegañ (Gl. *imaginer*). 2 Hervez Lacan, unan eus tri gwere pennañ ar vaezienn vredelfennadel (an daou all o vezañ an *trael*, Gl. *réel*, hag an *argel*, Gl. *symbolique*), naous dre souridigezh ar c'heñver ouzh skeudenn ar c'hetpar kantouezet gant ar gouzrec'h evel e zrec'h (e skeudenn veleour) (sl. *réel, stade du miroir, symbolique*).

imago ◇ **imago** ◇ **imago b.** Hervez Jung, pimpatrom diemouez da dudenoù danzeet diwar darempredoù kentañ ar bugel (gant e vamm, e dad, h.a.) a dalvezo dezhañ da zanvez evit dec'havaelañ an hentez da c'houde.

imbécillité ◇ **imbecility** ◇ **Ø** Termen dispredet, bet erlec'hiet outañ ar c'herienn Gl. *deuxième degré de l'arriération mentale* (Br. *eil derez an dilerc'hegezh kefredel*); merkañ a ra ul live kefredel gavalet etre hini ur bugel 2 vloaz ha hini ur bugel 7 vloaz; dispredet eo ivez an termen *imbécillité phénylpyruvique*, erlec'hiet outañ *oligophrénie phénylpyruvique* (sl. *arriération intellectuelle, débilité, idiotie*).

immature ◇ **immature** ◇ **1 diazv aa. 2 diazved g. -idi 3 anazv aa.** 1 Er Vredoniezh, a-zivout an hinienoù a zo chomet e darn o diorreadur kantaazel, kefredel, kevredigezhel. 2 Hinienn diazv, sk. : paot ouzh paot eo an diazvidi gantaazel er broioù diorreet. 3 Er Vevoniezh, a-zivout ur gellig, ur gwriad, un organ, un arc'hwel n'o deus ket diraez et dibenn o diorreadur.

immaturité ◇ **immaturity** ◇ **1 diazveted b. 2 anazvded b.** 1 Bezañ diazv, sk. : diazveted kantaazel. 2 Bezañ anazv, sk. : anazvded ar c'hwezbigell (Gl. *immaturité vésicale*).

immédiat ◇ **immediate** ◇ **kentizhek aa., dihanteradek aa.** Hep hanterad, sk. : *selaouennañ kentizhek*, gwezhiet dre arloañ ar skoaz ouzh korf ar c'houziviad, hep hantererezh ur stetoskop (sl. *auscultation*).

immobilisation ◇ **immobilization** ◇ **diloc'hekaat** Derc'hel difiñv ur parzh eus ar c'horf war-benn dereizhañ un distummadur pe parraot ouzh ur c'hammlakadur dre arloañ steudelloù plastret, metalek pe mezellek (rousinoù), stlegoù sach-astenn, h.a., sk. *diloc'hekaat ur sezenn dorradur* (Gl. *immobilisation d'un foyer de fracture*).

immortalisation ◇ **immortalization** ◇ **divarvelaat** Gant ur gellig, mont araezek da emrannañ dibenndermen war diñvañ, dindan wered danvezenoù hanweiat.

immun ◇ **immune** ◇ **hangae aa., hangaeek aa.** A-zivout ur bevedeg er stad a hangae.

immunisation ◇ **immunization** ◇ **hangaeañ, hangaeadur g.** 1 Da heul keraez un antigen, parañ un antikorf o wareziñ ar bevedeg pe, e eneb, o tevoudañ ur c'hleñved dre genniñv ouzh an antigen. 2 Gwezh mezege, anezhañ debarañ an hangae d'ur bevedeg dre e vaksinañ (*hangaeañ oberiat*, Gl. *immunisation active*) pe ensinklañ ur gwadvez spesadel (*hangaeañ gouzañvat*, Gl. *immunisation passive*) (sl. *allergie, anaphylaxie, auto-immunisation, hétéro-immunisation, iso-immunisation*).

NOTENN* : Daskemmet eo bet an despizadur e 2021 ivez : “Argerzh o reiñ tro d'un hinienn da vezañ gwarezet enep ur c'hleñved dre ar vaksinañ. Kevatal eo an kez termen gant *vaksinadur* pe *ensinkladur*. A-hervez, hangae ebet hep vaksinañ enta ?

immunisation adoptive, immunité adoptive ◇ **adoptive immunity** ◇ **hangae pe hangaeañ herberc'hiat** Treuzkas gouzañvat d'ur bevedeg an hangae ouzh un antigen diwar-bouez kelligoù hangaec'hougonek bev (*limfokit toazonamlegat* pe *limfokit T*) douger an antikorf azas (sl. *immunothérapie*).

NOTENN : Kemm a lakaer etre an hangaeañ gouzañvat debaret dre ensinklañ ur gwadvez spesadel (*hangaeañ gouzañvat dour-ennel*, Gl. *immunisation passive humorale*) hag an hangaeañ herberc'hiat debaret dre ensinklañ kelligoù hangaec'hougonek bev o tont eus ur roer hilunglad (*h. gouzañvat kelligel*, Gl. *i. passive cellulaire*) (sl. *facteur de transfert*).

immunitaire ◇ **pertaining to immunity** ◇ **hangaeel aa.** A-zave d'an hangae (sl. *compétence immunitaire*).

immunitaire : maladie ~, **dysimmunopathie** ◇ **immunologic disorders disease** ◇ **hangaenaoued g., mihangae g.** Kleñved a-geñver gant ur strafuñh kementadel pe doareadel eus araezioù difenn naturel ar bevedeg : reizhiad hangaeel skort (*hangae-zivig*), pe uc'herwezhius (*dreistkizidigezh*), pe ec'houleviat (*kleñvedoù unanhangaeel, kleñvedoù an hangaegemplezhioù*) (sl. *auto-immune : maladie* ~, *carence immunitaire, complexes immuns, hypersensibilité, immunodéficiente : maladie* ~, *immunodéficiente acquise : syndrome* ~).

immunitaire : système ~ ◇ **immune system** ◇ **reizhiad b. hangaeel** Teskad araezioù difenn ar bevedeg ouzh ar c'heuziadoù allevel, lod o vezañ *anspesadel* (reizhiad dourennel : klokaenn, properdin, opsoninoù; reizhiad kelligel : histiokit, makrofag; interferon), lod all o vezañ *spesadel*, azasaet evit an difenn ouzh un antigen dibarek : an antikorfoù gwadvezel (hangae dourennel) hag al limfokit T, gwezherioù an hangae dre handizh kelligel (sl. *carence immunitaire, cellules immunocompétentes, immunité*).

immunitaire

- *carence immunitaire, déficit immunitaire, immunodéficience* divig hangaeel, hangaezivig (sl. *carence immunitaire, SIDA*)
- *compétence immunitaire, immuno-compétence* gougon hangaeel, hangaec'houg (sl. *compétence immunitaire, cellu-les im-*

munocompétentes) • *maladie immunitaire, dysimmunopathie* hangaenaoued, mihangae • *tolérance immunitaire, immunotolérance* gougemer hangaeel.

immunité ◇ **immunity** ◇ **hangae** g. 1 Perzh a zo gant hiniennoù 'zo da vezañ salv diouzh nep anaez pa vezont en ardizh ur gwezher kleñvedel (bakteri, kelligoù pe o borc'hadoù, proteinoù, h.a.), gantañ roll un antigen; an *h.* a c'hell bezañ pe *naturel*, enganet, pe *arzeuat* hag, en degouezh-se, pe emdarzh, da heul ur pore (hemañ erzerc'h pe amguzh), pe devoudet gant un ober yac'hadel; an *h.* devoudet da lavaraer *oberiat* pa erwezh ar bevedeg dre zranzen e unan an danvezennoù difenn ouzh ar gwezher kleñvedel (vaksinadur), ha *gouzañvat* pa zanzeer ermaez anezhañ an danvezennoù hangaeüs a-raok o diounit (gwadveizyac'h-adur). 2 Dre astenn ster, gant aozerion 'zo, nep bezañs antikorfoù en ur bevedeg, ha pa ve e disoc'h un erwezh difenn (hag int gwarezus enta), pe diwar ur c'henniñv antigen-antikorf (hag int gwazhus); neuze ez a an termen hangae kenster da hangaeadur (Gl. *immunitation* 1), allergiezh (hangaeallergiezh), dreistkizidigezh; kemm a lakaer etre **a**) an *hangae* (*dre handizh*) *dourennel* pe *h. hogoze* pe *h. yalc'hamplegat* (Gl. *immunité (à médiation) humorale* pe *i. précoce* pe *i. bursodépendante*), an hini paotañ, diwar ar vezañs er gwadvez eus antikorfoù amredat (immunoglobulinoù) borc'h et gant al limfokit B hag ar plasmokit, **b**) an *hangae* (*dre handizh*) *kelligel* pe *h. ampellet* pe *h. toazonamplegat* (Gl. *immunité (à médiation) cellulaire* pe *i. retardée* pe *i. thymodépendante*), araezet dre al limfokit T kizidikaet ent spesadel ouzh un antigen a zistrujont dre gelligipistriañ a-ziaostok pe dre zilaoskiñ hanteradoù anspesadel, al limfokinoù (erwezh distaal an imboud, erwezh imboudenn ouzh ostiz, erwezhoù dreistkizidigezh ampellet, h.a.) (sl. *cellules immunocompétentes, immunitaire : système* ~).

NOTENN* : Kent 2020 e kaver war load an ABY despizadur an *hangae stroll* (Gl. *immunité collective, immunité de population* Sz. *herd immunity*) : “An hangae stroll zo ar gwarez ameeun enep ur pore a c'hoarvez pa vez ur boblañs hangaeet pe dre ar vaksinadur, pe dre an hangae amparet dre ur poreadur kent.” E 2020 e kemme an ABY e load hag e kaver an despizadur nevez : “An hangae stroll — pe *hangae poblañs* — zo un argraf arveret evit ar vaksinadur, ma c'hell ur boblañs bezañ gwarezet enep ur viruz roet mar bez tizhet ur gwehin vaksinañ. An hangae stroll a vez amparet dre wareziñ an dud diouzh ur viruz, hep o lakaat en ardizh anezhañ.” Diverket eo bet keal an *hangae naturel*, gant an amboaz liammañ vaksinañ ha hangaeañ (sl. *immunitation*).

immunité vraie ◇ **residual immunity** ◇ **hangae dilerc'hiat** Hangae amparet goude ur pore lemm hag o trebadout pell amzer goude ar pare.

immunoadhérence, adhérence immune ◇ **immune adherence** ◇ **hangaezastrann** Lenañ ar c'hemplezhioù antigen-antikorf-klokaenn ouzh gorre al leukokit (limfokit B, granulokit, monokit, makrofag), an hemati hag ar pladanoù, anadenn oc'h aesaat ar bakidigezh anezho gant ar fagokit; kalvezder arveret ivez evit deznaouiñ un antigen (bakteri, viruz, h.a.).

immunoadsorption ◇ **immunoadsorption** ◇ **hangaeamsunañ** Kalvezder karzhañ ezkorfel engwezhet evit ezvevennañ an unanantikorfoù kleñvedus ha hangaeemplezhioù 'zo, prederiadur an anaezioù unanhangaeel a 'l lounezh, a 'r galon, a 'r c'hroc'hen, a 'n nervennoù.

immunoblastes ◇ **immunoblasts** ◇ **immunoblast** s. Kelligoù yaouank evodet eus limfokit bihan, treuzfurmet e-barzh ar bolc'hennoù limfoidel dindan delanvad un antigen spesadel pe get.

immunochimie ◇ **immunochemistry** ◇ **hangaeagimiezh** b. 1 Studi luniad kimiek an antigenoù hag an antikorfoù. 2 Lodenn eus ar gimiezh o studiañ an erwezhoù hangaeel, an dazgweredoù antigen-antikorf.

immunochimique ◇ **immunochemical** ◇ **hangaeagimiek** aa. A-zave d'an hangaeagimiezh.

immunocytes ◇ **immunocytes** ◇ **immunokit** s. Anvad roet gant aozerion 'zo d'al leukokit T.

immunodéficience ◇ **immunodeficiency** ◇ **hangaezivig** Leiadur pe steuz an erwezhoù hangaeel (sl. *immunitaire : maladie* ~, *immunodéficitaire : maladie* ~, *immunodéficitaire acquis : syndrome* ~).

immunodéficitaire : maladie ~ ◇ **immunological deficiency disease** ◇ **kleñved hangaezivigel** Kleñved naous dre skorted an araezioù difenn spesadel a 'r bevedeg.

immunodéficitaire acquis : syndrome ~, **SIDA, sida, syndrome d'immuno-nodépession T épidémique, SITE, carence immunitaire T épidémique, CITE** ◇ **acquired immune deficiency syndrome, AIDS** ◇ **azoniaz an hangaezivig arzeuat, HAZA, haza** g. Rouestladoù goulerc'hat d'ar poreadur gant ur retroviruz eus an iskerentiad *Lentivirus*, ar VIHAD (*viruz an hangaezivig arzeuat denel*, Gl. *virus de l'immunodéficience acquise humaine, HIV, VIH, Sz. human immunodeficiency virus, HIV*), oc'h enteñ dre geraez glaourgenel pe drewanel, treuzkaset dre an darempredoù revel, ar gwad, ar sankadennoù pe gant ar vamm d'ar bugel (e-kerz ar vec'hiegi, ar gwilioud pe al laezhañ); dre boreañ ha distrujañ al limfokit T harper (sl. *cellules T auxiliaires*) T4 pe CD4, e tevoud isniver al limfokit ha divig an hangae kelligel, dre se e laka da zinoññ poreadurioù koulztaer grevus ha kankroù; bez' e vez un entremez hir pe hiroc'h (10 bloavezh ent keitat) etre an tredizhañ hag an ampoent ma tiskenn feur al limfokit T CD4 dindan ar gwehin a 200/mm³ gwad ha ma krog erzerc'hadoù eilvedel an hangaezivig da anadiñ — an haza ent strizh eo; e 1993 e voe savet ur *reizhiad rummañ erzerc'hadoù klinikel ar poreadur dre VIHAD : rummad A* : kentporead azoniek, poread diazon, c'hwarrrenn hollek trebadek; *rummad B* : angiomatoz bazhellel, miwe gouzoug ar grozh, terzhien 38,5°C pe darc'hoal e-doug ouzhpenn miz, kandidiaz adfeilhus ar genoù, ar c'hargadenn pe ar gouin, senkl arreadek pe aloubus, leukoplaziezh kreonek an teod, purpura olpladanel hennadek, korzenno gant pugnezioù, nervennaoued trobarzhel, h.a.; *rummad C* (darbennet evel despizadur haza an oadour) : kandidiaz ar bronkez, ar vriant, ar skevent, an treizher, kankr aloubus gouzoug ar grozh, kriptosporidiaz ar pervez e-doug ouzhpenn miz, poread dre CMV (kitomegaloviruz) al luc'hsae ha dallder, poreadoù dre CMV a lec'hiadurioù all, poread dre empennaoued dre VIHAD, eror strewek : angreizhoù henek er skevent hag en treizher, sarkom Kaposi, limfom immunoblastek, poread dre vikobakteri strewek skeventel pe ezskeventel, skeventfo bakteriel arreadek

dre *Pneumocystis carinii*, gwennempennaoued liesannon argammedek, gwadlestegezh arreadek dre *Salmonella*, toksoplasmoz en empenn, fallezh a 'r VIHAD; viruz an haza a ra d'ar bevedeg parañ antikorfoù na spiront ket d'e neptuiñ; ar vezañs anezho a lakaer war wel dre ar gwadveizproud, alese an termenou *gwadveizyaek*, *gwadveiznac'hek* (Gl. *séropositif*, *séronégatif*) arveret da aroueziñ ar c'houzviaded hervez ma tinoer pe get antikorfoù VIHAD en o gwad; evit c'hoazh ne bareer ket an haza, gvennañ ne reer ken an dedro anezhañ dre ziounit enepviruzeier (triyac'hadur), hangaearoulevieroù, bevastalieroù, mitozastalieroù; e diouer ur prederiadur parañ, ez arbouezer an diartennoù ergurañ : stummañ ar c'hoskor arouelañ, koulzadoù stlennañ dre ar mediaoù; amkan pennañ an imbourc'hioù hiziv e chom kevrikaat ar vaksin enep-haza.

immunodépresseur, immunosuppresseur ◇ **immunosuppressive** ◇ **1 hangaeastaler aa. 2 hangaeastaler g. -ioù** I O leiaat pe oc'h astaliñ an ervezhioù hangaeel spesadel ouzh un antigen dre *dolc'hañ* reizhiad difenn hangaeel dourennel pe gelligel ar bevedeg ha deren hemañ d'ur stad a c'hougumer hangaeel (sl. *tolérance immunitaire*). 2 Gwezher an hangaeastaliñ; an hangaeastalieroù pennañ zo ar skinoù X, ar gourzhennevidadoù (sl. *antimétabolites*) evel an tiopurin o c'hevennañ al limfokit T (pe kelligoù toazonamplégat, sl. *cellules thymodépendantes*) pe an alkilerioù (Gl. *alkylant*, Sz. *alkylating agents*), gvennerioù ar c'helligoù toazonamplégat hag ar c'helligoù yalc'hamplegat, ar c'hortikoidoù, ar gwadveiz eneplimfokit, o tispenn ar c'helligoù toazonamplégat hag o virout ouzh al limfokit a naouaat an antigen, ar c'hiklosporin (sl. *cyclosporine*), antikorfoù monoklonel 'zo, h.a.; arveret e vez an hangaeastalieroù evit skoilhañ ouzh distaol an organoù treuzplantet.

immunodépression, immunorépression, immunosuppression ◇ **immunodepression** ◇ **hangaeastaliñ, hangaeastal g.** Diren pe steuziñ ervezhioù hangaeel ur bevedeg ouzh un antigen.

immunodiffusion : technique d'~ ◇ **immunodiffusion, gel diffusion** ◇ **kalvezder hangaeskignañ** Hentenn arglask ha dezventañ un antigen en ur gwadveiz, dre lakaat war wel reizhiadoù antigen-antikorf dre zierc'hiñ en ur metoù gelekaet; mar revez an antigen er gwadveiz, pa zegaser hemañ e diastok ur metoù gelekaet (geloz) intret gant an antikorf keñverek, e tinod un dierc'had o skignañ dre ar geloz en ur furmiñ regoù dierc'hiñ el lec'hioù ma vez ar c'henfeur azasañ etre bec'hioù ketep an antigen hag an antikorf, o pourchas dre se an araez da briziañ feur an antigen er gwadveiz.

immunoéfecteur ◇ **immunogenic** ◇ **hangaezewerc'her aa.** O tec'han ervezhioù hangae.

immunoélectrophorèse ◇ **immunoélectrophoresis** ◇ **hangaedredannizhañ** Hentenn elfennañ al liñvennoù bevedel kemplezh dre gevreañ gwered skarat an tredannizhañ hag an dierc'hiñ spesadel diwar-bouez ur gwadveiz eraozet evit dazgwerediñ a-ziuz ouzh ur protein plasmatek, un immunoglobulin da skouer; al liñvenn da elfennañ entoueziet en ur gel, a ya dindan wered un tredanvaez o skarat ar proteinoù hervez tizh amgenk tredannizhadel pep hini; ar gwadveiz eraozet a skuilher en ur sazil a-stur da roud an nizhañ; dre skignañ er gel e kej an antikorfoù a zo ennañ gant o antigenoù keñverek ha furmiñ regoù dierc'hiñ dinouñ (sl. *immunodiffusion, immunofixation*).

immunoenzymologie ◇ **immunoenzymology** ◇ **hangaeenzimouriezh b.** Skourr an Hangaeoniezh arbennikaet war arglask ha dezventañ antikorfoù hag antigenoù diwar-bouez enzimou.

immunofixation ◇ **immunofixation** ◇ **hangaelenañ** Kalvezder hennadiñ an immunoglobinoù monoklonel hefiloc'h eget an hangaedredannizhañ : reiñ a reer d'an immunoglobulinoù pep a loabr nizhañ hag ez ouzhpenn livuzennoù a ya da lenañ ouzh an dierc'hadou.

immunofluorescence : méthode d'~ ◇ **fluorescent antibody test** ◇ **hentenn an hangaegendreluc'hañ, proud an antikorf kendreluc'h** Lenañ fluoreskein ouzh un antikorf war-benn e zaskavout dre araez ar c'horrgresker el luc'h dreistmouk e-barzh ar c'hemplezhioù antikorf-antigen.

immunogène ◇ **immunogen** ◇ **hangaeiad g. -où** Antigen en araez da zevoudañ ur respont hangaeel e rezh furmidigezh antikorfoù pe da zec'han un erwez dreistkizidigezh ampellet (alese, n'eus ket hangaeiadoù eus an holl antigenoù).

immunogène ou immunogénique ◇ **immunogenic** ◇ **hangaeiat aa.** En araez da zevoudañ ur respont hangaeel.

immunogénétique ◇ **immunogenetics** ◇ **hangaeiloniezh b.** Studi delanvad an hêrezh war an ervezhioù hangaeel; gennoù 'zo, treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, anvet *gennoù ar respont hangaeel* (Gl. *gènes de réponse immunitaire* pe *gènes Ir*), a vez o roll arouleviañ ervezhioù hangaeel ar bevedeg ouzh an antigenoù.

immunogénicité ◇ **immunogenicity** ◇ **hangaeiadezh b.** Barregezh da zevoudañ ur respont hangaeel, amgement hervez an hiniennou : an antigen-mañ antigen o kaout brasoc'h hangaeiadezh gant an den-mañ den eget gant unan all.

immunoglobulin : thyroid stimulating ~, TSI ◇ **thyroid stimulating immunoglobulin, TSI** ◇ **immunoglobulin skoedennfrauaer, TSI** Antikorf spesadel (IgG) o lenañ ouzh koc'henn kelligoù ar skoedenn hag o fraouaat ar borc'hañ anezho.

immunoglobuline ◇ **immunoglobulin** ◇ **immunoglobulin g.** Termen genadel oc'h erdalañ globulinoù diseurt, dezho luniadoù bevgimiek leteñvel, gougevret hogos an holl anezho ouzh stroll ar gammablobulinoù (arouez Ig), bezant er gwadveiz hag e lies liñvenn vevedel, ganto ur gwered antikorf hag ur roll bevret en emziav ar bevedeg diouzh ar c'heuziadoù; dasparzhet emañ an Ig etre 5 kevrennad : IgG (ar re baotañ), IgA, IgM, IgD, IgE (*Aozadur Bed ar Yec'hed*); en holl gevrennadoù, e c'hoarvez ar molekul a zaou zigorvell polipeptidek ereet kenetrezo gant pontoù disulfidenn : ur re *digorvelloù skañv* pe *digorvelloù L* (eus Sz. *light chains*), boutin etre holl gevrennadoù Ig, daou seurtad anezho arouezet κ ha λ hag ur re *digorvelloù ponner* pe *digorvelloù H* (eus Sz. *heavy chains*), piaouel da bep kevrennad Ig : digorvell γ evit evit an IgG, digorvell α evit an IgA, digorvell μ evit IgM, digorvell δ evit an IgD, digorvell ε evit an IgE (e-touez ar re-mañ ar reaginoù, dizoloet e 1966); dibarek eo ur seurtad Ig, nann dre o luniad, met dre o orin : an Ig monoklonel, borc'het gant an un klon plasmokit, alese an unrezhded molekulel anezho; war dresenn an tredannizhañ e vezont rezhienet dre ur pik uhel ha strizh; kavet e vezont en holl gevrennadoù Ig, hag an arouez e

vezont peurliesañ da gleñvedoù yud; enaozet e vez an Ig gant ar c'helligoù limfoidel (limfokit B), ha dreist holl gant ar plasmokit, dindan reolerezh lies reizhiad genennoù; da notañ e c'hell molekul Ig^γ zo bezañ kiriek d'ur gwered antigen.

immunoglobulinopathie ◇ **immunoglobulinopathy** ◇ **immunoglobulinaoued** g. Kleñved naouus dre un daralladur eus an immunoglobulinoù.

immunohématologie ◇ **immunohaematology** ◇ **hangaewadouriezh** b. Diskiblezh o plediñ gant ar perzhioù antigenel eus elfennoù luniek ar gwad hag eus al liñvennoù bevedel, gant an antikorfoù bezant er gwadvez ha gant an erzerc'hadoù kleñvedel o tisoc'h eus an dazgweredoù antigen-antikorf.

immunohémolyse : réaction d'~ ◇ **immunohaemolysis reaction** ◇ **dazgwered an hangaewadloezañ** Dispenn an hemati bet kizidikaet gant un antikorff spesadel dindan wered ar glokaenn.

immunologie ◇ **immunology** ◇ **Hangaeoniezh** b. Diskiblezh vezegel o studiañ ervezhioù (gwarezus pe argevezus) ar bevedeg ouzh un antigen (dazgwered antigen-antikorf); an *hangaeoniezh luniadel* (Gl. *immunologie structurale*) zo ur skourr eus an *H* oc'h imboureñ hiñ kenaoz volekulel an elfennoù o kendaoliñ d'an dazgweredoù antigen-antikorf.

immunologique ◇ **immunologic** ◇ **hangaeniel** aa. A-zave d'an Hangaeoniezh.

immunomimétique ◇ **immunomimetic** ◇ **hangaeeveler** aa. O tec'h an argerzh heñvel ouzh un erwezhangaeel dibarek; *damoug darblegadel hangaeeveler* (Gl. *réflexe conditionné/el immunomimétique*) a reer eus un erwezhangaeel hevelep ma 'z eo dewerc'h et daskemm leukokitel ar gwad hag ar parañ antikorfoù dre zamougoù darblegadel.

immunomodulateur, immunorégulateur ◇ **modulating the immune response** ◇ **1 hangaeareulevier** aa. **2 hangaeareulevier** g. -ioù 1 2 O reoliñ an ervezhioù hangaeel dre o heudiñ pe dre o fraouaat.

immunoparasitologie ◇ **immunoparasitology** ◇ **hangaearvevadouriezh** b. Studi perzhioù antigen an arveveded hag an antikorfoù o tinodiñ diwarno er bevedeg erialet.

immunopathologie ◇ **immunopathology** ◇ **hangaegleñvedouriezh** b. Studi an ervezhioù kleñvedel e dianlen keraezad ar bevedeg gant un antigen ha dinodad an antikorff keñverek (kenniñv antigen-antikorf), studi ivez ar strafuilhoù a-geñver nep ezreolder en araezioù difenn naturel ar bevedeg (sl. *maladie immunitaire*).

immunopharmacologie ◇ **immunopharmacology** ◇ **hangaeliaoniezh** b. Diskiblezh vezegel o studiañ an danvezzennoù en araez da werediñ war araezioù difenn ar bevedeg ouzh ar c'heuziadoù diavaez.

immunoprécipitation ◇ **immunoprecipitation** ◇ **hangaezierec'hiñ** Diwanadur un dierc'had pa ged un antikorff (lavaret *dierec'hiat*, Gl. *précipi-tant*) gant un antigen keñverek, kediadenn a c'hell c'hoarvezout en ur metoù liñvel, sonnel (gelo) pe war linenn getal an antigen hag an antikorff da geñver un hangaeskignañ pe un hangaedredannizhañ (sl. *immunodiffusion, immunoélectrophorèse*).

immunoprévention ◇ **immunoprophylaxis** ◇ **hangaegerurañ** Hangaeyac'haat e sell da wareziñ ar bevedeg ouzh keuziad un antigen.

immunoprolifératifs : syndromes ~ ◇ **immunoproliferative syndromes** ◇ **azoniadoù hangaeneradel** Stern nosologek oc'h erdalañ ar c'hleñvedoù naouus dre emrannadeg ezreol kelligoù an ac'had limfokitel, eleze ar c'helligoù e devoud an ervezhioù hangaeel; neridigezh, pe eus an *ac'had limfokitel B*: kleñved Kahler, leukemiezh limfoidel henek, makroglobulinemiezh Waldenström, kleñved an aglutininoù yen, kleñvedoù an digorvelloù ponner, limfom Burkitt, gammaoued monoklonel kuñv, pe eus an *ac'had limfokitel T*: azoniad Sézary, kleñved Hodgkin, leukemiezhoù.

immunoscintigraphie ◇ **immunoscintigraphy** ◇ **hangaeskingannluniñ** Kalvezder skeudennerezh war arnod c'hoazh oc'h arverañ un antikorff tiellet dre un izotop skinoberiek o vont da lenañ ouzh an antigen arglasket (dassez ur c'hankr er vierrez pe er c'holon-youlec'h dreist holl) da vezañ dinoet dre c'hlennañ (sl. *cartographie, scintigraphie*).

immunosélection ◇ **immunosélection** ◇ **hangaeziuz** Dreistbevañ (naturel pe galvezadel) rizhoù 'zo kelligoù dre benn o harzder antigenel (sl. *immunotoxine*).

immunosérologiques : méthodes ~, méthodes séro-immunologiques ◇ **immunoassay** ◇ **hentennoù hangaewadvezel, hangaeigouniañ** Araezadoù engwezhiet evit naouaat ha dezventañ an antigenoù hag an antikorfoù er gwadvez (sl. *immunodiffusion : technique d'~, immuno-enzymologie, immunofluorescence : méthode d'~, radio-immunologique : méthode ~*).

immunostimulant, immunostimulateur ◇ **immunostimulant** ◇ **hangaefraouaer** g. -ioù O tec'h an hangaefraouaat.

immunostimulation ◇ **immunostimulation** ◇ **hangaefraouaat, hangaefraouaerezh** g. Delankañ pe vuiaat ervezhioù ar bevedeg ouzh un antigen, hentenn arveret er yac'hadurezh evit kreñvaat difennerezh ar bevedeg; bez' e vez pe spesadel enep un antigen dibarek (vaksinoù pe gwadveizoù), pe anspesadel (arver ar BCG enep kankroù 'zo).

immunothérapie ◇ **immunotherapy** ◇ **hangaegerurañ, hangaeyac'haat** Hentenn vezegañ amkanet da zaskemmañ araezioù difenn ar bevedeg : **1)** pe *startaat* an ervezhiañ ouzh un antigen lavaret, **a)** dre sankañ gwadvez pe immunoglobulin evit pourchas an antikorfoù spesadel (*hangaegerurañ gouzañvat*), **b)** dre ar vaksingurañ, o tec'h an paridigezh an antikorfoù (*hangaegerurañ oberiat*), **c)** pe *nershaat* an ervezhiañ dre araezioù anspesadel (BCG pe, pa vez divig hangaeel, dre sankañ gammaglobulinoù pe imboudañ mel eskern); **2)** pe *dereizhañ* ervezhioù ezreol ar reizhiad hangaeel, da skouer an anaezioù allergek pe furmidigezh an hangaegemplezhioù; **3)** pe astaliñ an ervezhioù difenn, da skouer evit ober gougumer un imboud pe un organ treuzplantet (sl. *immunisation adoptive*).

immunothrombopénie ◇ **immunothrombopenia** ◇ **hangaolpladanoù** g. Isniver ar pladanoù dre berzh an distruj anezho gant un unanantikorf.

immunotolérance, tolérance immunitaire ou **immunologique, paralysie immunitaire** ◇ **immunological tolerance** ◇ **gougemer** g. **hangaeeel, hangaec'hougemer** g., **hangaeliveriñ** Diaraezded ur bevedeg oadour da zelankañ ur respont hangaeel pa vez keraezet gant un antigen boas da zec'h an ervezhioù hangaeel; diaraezded o tarvezout a) pa da heul enkoradur an antigen e deizioù kentañ ar vuhez, eleze d'ur mare ma vez divarrek ar bevedeg da hangaeañ, ken e c'hougemer, da c'houde, an antigen evel pa vije lodek en e wiadoù, b) pe, gant an oadour, da heul ur mezegadur hangaeastaliñ hag e se un argerzh herouezañ hangaeel, c) pe da heul sankadur an antigen a zoenadoù paoterek pe, en eneb, boc'hedel (sl. *facilitation immunitaire, immunodépression, intradermo-réaction, tolérogène*).

immunotoxine ◇ **immunotoxin** ◇ **hangaedoksin** g. Kediañ un antikorf monoklonel gant an tammad gwezhus eus un toksin polipeptidek; hemañ a zistruj ent hanbarek ar c'helligoù o tougen an antigen keñverek d'an kez antikorf; en arver evit prederiañ anaezioù yud 'zo, al leukemiezhoù pergen, pe en argerzhioù hangaeziuz (al limfokit T da geñver an imboudañ organoù) (sl. *immunosélection*).

immunotransfert ◇ **western blot, immunoblotting** ◇ **hangaedreuzkas** Kalvezder elfennañ hangaeel amkanet da lakaat war wel antigenoù 'zo dispartiet dre dredannizhañ ha d'o zreuzkas war ur gousol sonnel hag erfin d'o digelañ dre ur sont skinoberiek (sl. *buvardage, dot blot*).

immun-plasma ◇ **immune plasma** ◇ **hangaebasma** g. Plasma gwad ennañ antikorfou danvezet, evel an hangawadveiz, evit debarañ un hangae gouzañvat (sl. *immunisation, sérum immunisant*).

impact(-)

• *fracture engrenée ou impactée, avec interpénétration et immobilisation des fragments* torr darsiket, m'emañ an tammoù kenetresanket ha diloc'hekaet • *impact de balle* enorc'h ur boled • *impacter les fragments fracturés du col fémoral* kengovliñ an tammoù eus torr gouzoug an askorn morzhed • *molécule d'adn où se produit une lésion par l'impact d'une particule ionisante* molekulenn DNA ma c'hoarvez un anaf diwar enorc'h ur rannig ionaus.

impair

• *os impair et médian situé à la partie antérieure du crâne* askorn undañvat ha kreizer loet e rannbarzh arak ar c'hloppenn.

impaludation ◇ **impaludation** ◇ **paludenneriñ** Prantad aloubiñ hematozoed ar baludegezh er bevedeg (sl. *paludothérapie*).

impédance ◇ **impedance** ◇ **luzded** b. Harz a-berzh ur reizhiad pe ur metoù ouzh treled un anadenn drovezhiek; keal arveret en Dredanouriezh (rannad ar c'hemm barr etre bonnoù ur rehent dre read ur red pebeilat), e Loc'honiezh an heverennoù (rannad ar gwask dre ar c'has en un trevad sanelloù); er Veedouriezh e talvez da studiañ diver an aer e skoultrig an analañ pe ar gwad er reizhiad wazhiedel; *luzded ar reizhiad talmerel* a reer eus teskad ar parennoù o herzel ouzh an diflitr kofigel (stad speurioù ar gwazhied, gludegezh ar gwad, h.a.).

imperforation ◇ **imperforation** ◇ **andigor** g., **peuranvoll** g. Kammeuziad anezhi anforzh ur ganol pe un igorenn naturel (sl. *atrésie*).

impétiginisation ◇ **impetiginization** ◇ **impetigoñ** Poreañ dre strepokok eilvedel d'un dermatoz pe d'un anaf kroc'hen.

impétigo ◇ **impetigo** ◇ **impetigo** g. Dermatoz paot kenan gant ar vugale, o sezañ war an dremm hag an daouarn, naoues dre c'hwezigennoù burbueiat o tilaoskiñ ul liñvenn a fetisa e rezh trousek azvelen dezverkus, anezhañ ur poreadur dre vakteri lineiat (strepokok ha stafilokok) tredizhus hag unanenkoradus.

implant ◇ **implant, insert** ◇ **ensteud** g. Danvezenn yac'hadel (feran, tammadoù gwiad) ensezet e-barzh ar gwiad kellaouek endan-groc'hen (sl. *comprimé, implantation*).

implant dentaire ◇ **dental implant** ◇ **ensteud dant, dantensteud** g. Gwrizienn galvezadel kroc'han pe titan a ensezer e-barzh ul logig dant warbenn skorañ un dantosod.

implantation ◇ **implantation** ◇ **ensteudañ, ensteudad** g. 1 Ensezañ e-barzh ar gwiad kellaouek endan-groc'hen moustradoù arzilerc'h pe feranoù (Gl.Sz. *pellets*), enno danvezennoù gwezhus (hormonoù revel pe kaenuslounezhel, neuroleptier) pe tammadoù gwiad (torzhienn, amnion), deloezet gorrek hag o werediñ war ar bevedeg e-doug un pe lies sizhunvezh. 2 Ensezañ un ensteud dant, ferenn, melc'houedenn.

implantologie ◇ **implantology** ◇ **ensteudouriezh** b. Lodenn eus an dentouriezh o plediñ gant an ensteudañ.

implant-

• *au moment de l'implantation utérine de l'œuf fécondé* d'an ampoent ma englen ar vi speriet ouzh an enkrozhenn • *détacher des fragments d'ADN et les implanter in vitro sur des chaînes d'ADN appartenant à des espèces différentes* distagañ tammadoù DNA evit o ensteudañ *in vitro* war arrevelloù DNA hiniennoù allspesad • *phanères implantés dans le cuir chevelu* faner ensteudet er brigenn • *poils raides et courbes implantés sur le bord des paupières* blev reut ha kromm ensteudet war ribl rez ar malvennoù • *surface d'implantation du placenta* leur enkrapañ an dorzhienn.

importé ◇ **imported** ◇ **enbroet** A-zivout ur pore dastumet gant un den er-maez eus ar vro ma emañ o chom, sk. : *paludegezh enbroet*.

import-

• *agitation psychomotrice importante* kefroñ bredloc'hadel muiek • *augmentation importante du volume d'un membre* muiadur

a-vras ec'honad un ezel • *groupe de cellules génétiquement identiques le plus important dans un ensemble* stroll kelligoù hilunglad muianiverek en un hollad • *hyperplasie importante* uswe muiek • *l'importance des troubles psychiques* muiegezh ar strafuilhoù bred • *œdèmes importants* gouliñvoù muiek • *numériquement le plus important* muianiverek • *un nombre important de cellules* un niver bras a gelligoù.

impos-

• *accident imposant l'intervention* darvoud ennegad groñs d'an oberata • *conservation d'attitudes imposées* arzerc'hel emstummoù delakaet • *l'alimentation forcée peut être volontaire ou imposée* ar boueta dre redi a c'hell bezañ a-youl (emvoueta dre redi) pe a-zestrizh • *pensées qu'il ne reconnaît pas comme siennes, qui lui imposent des actes* dezevoù na anavez ket evel e re, o c'hourlakaat dezhañ realoù.

impot-

• *déficit de la marche, impotence* andrafted • *évoluant vers l'impotence complète* o tedreiñ betek an andrafted klok • *impotence absolue* peurandrafted • *le degré d'impotence fonctionnelle d'un membre* derez andrafted un ezel.

imprégnation ◇ **impregnation** ◇ **speriañ** Frouezhigiñ ar vigellig gant ar spergellig.

imprégn-

• *imprégnation calcaire des tissus* intradur razez ar gwiadoù • *substance colorée susceptible d'imprégner temporairement ou durablement un tissu* danvezenn livek en araez da intrañ ent padennek pe ent trebadek ur gwriad • *tissu conjonctif imprégné de chondrine* gwriad kenglenel karget a gondrin.

impression basilaire, invagination basilaire ◇ **basilar impression** ◇ **entourzhañ diazpenn, entourzhad g. diazpenn** Disneuiziad ar c'hlopenn da heul ur strafuilh e diorreadur diaz an askorn kilpenn, naouus dre zilec'hiadur war grec'h an toull bras, melloù kentañ ar gouzoug o hanvalout bezañ sanket e-barzh kavenn ar c'hlopenn; ar skinluniou a-letu a ziskouez diaz ar c'hlopenn argeinek war grec'h ha basoc'h ar poull adreñv; hevelep disneuiziadur a stader el lec'h, en askornvlodad, en osteoz arskoedel ha dreist holl e kleñved Paget.

impressions digitales ◇ **digital impressions** ◇ **louc'hadennoù** l. (b.) **bizied** Pukadennoù bas war dalbenn diabarzh eskern ar volzpenn, a-dal da droennoù an empenn.

impression

• *absence de toute perception visuelle sans impression d'obscurité* ezvezañs nep merzhad gweledel hep kantouezañ teñvalded • *éprouver des impressions cénesthésiques* emanglevoud • *éprouver une impression d'épuisement* anglevoud ur santadur ogvez • *imposer des impressions cénesthésiques* gourlakaat emanglevoudoù • *impres-sion d'épuisement* anglevad fillidigezh • *impression de cire molle donnée par les membres de certains patients* anglevad koar blot roet gant izili gouzviaded 'zo • *impression de mort imminente* anglevad ar marv kevogos • *impression désagréable de gonflement épigastrique* anglevad displijus koeñvadur an argreuzenn • *impres-sions diffuses et vagues parvenant par les sensibilités proprio- et interoceptive* anglevoudoù strewek ha dispis o tont dre an eraeziñ anun- hag endonfraouadel.

impubère ◇ **impuberal** ◇ **ankaezourek** aa. Nad eo ket tizhet gantañ/ganti stad ar gaezouregezh.

impuissance ◇ **impotence** ◇ **dic'halloud** Dic'hallusted da ren ar gediadenn revel klok, gant ar vaouez koulz ha gant ar gwaz, e dianlen un digenneuziad hag, ouzhpenn gant ar gwaz, dre benn ur migevod pe un derodiñ kentrat (sl. *dysfonction érectile*).

NOTENN : Hiziv ez arverer an termen peuz atav da arouezañ migevod ar gwaz.

impulsif ◇ **impulsive** ◇ **1 darlusk** aa. **2 darluskel** aa. 1 A-zivout un den, a zo gant darluskou; a-zivout ur real, a zo gant doare an darlusk. 2 A-zave d'an darlusk.

impulsion ◇ **impulsion** ◇ **darlusk** g. Ezhomm kaezhus, diharzadus da ren realoù anheboell, feuls, darwantus alies, a-wechoù emdarzhak, a-wechoù ersavek, a stader e lies bredanaez, neuroziou, psikoziou, mineuzidoù.

imputabilité ◇ **imputability** ◇ **arzodadusted** b. Gallusted ar c'heñver devouder-devouded etre div anadenn, div ergorenn.

imputer ◇ **to impute** ◇ **arzodiñ** Savelañ ur c'heñver devouder-devouded etre div anadenn, div ergorenn (klokaenn eun ar verb oc'h arouezañ an devouded, ar glokaenn ameeun an devouder), sk. : *arzodiñ ur pore d'ur viruz*.

in situ ◇ **in situ** ◇ **in situ** Gerienn latin (Br. *war al lec'h end-eeun*), arveret en droienn "kankr *in situ*", da arouezañ un epiteliom a zo an ezreolderioù gwiaadoniell anezhañ kantet strizh en epitelienn, eleze hep astenn lec'hiek na dassez.

in utero ◇ **in utero** ◇ **in utero** Gerienn latin (Br. *e-barzh ar grozh*), arveret da verkañ an darvoudoù o c'hoarvezout gant ar grouell, sk. : marv ar grouell *in utero*.

in vitro ◇ **in vitro** ◇ **in vitro** Gerienn latin (Br. *e-barzh ar werenn*), a-zivout an arseliñ erlamadoù diouzh ar bevedeg renet en imboure'hva.

in vivo ◇ **in vivo** ◇ **in vivo** Gerienn latin (Br. *war ar bev*), a-zivout an arseliñ anadennoù war ar bevedeg end-eeun, kuit a drewanad; kevenep da *ex vivo* (Br. *e-maez ar bev*), a-zivout arseliñ elfennoù erlamet diouzh ar bevedeg ha chomet bev, da skouer kelligoù tiñvet.

inaccessibilité ◇ **imperviousness** ◇ **ec'hantell** g. Strafuilh kefredel diwar anafoù ar c'horf karnek, anezhañ koll ar galloud da ersaviñ ouzh ar broudadoù diavaez, da stiañ an evezh, da arwerc'hañ an dezevoù (sl. *calleux : syndrome ~, corps calleux*).

inactivateur ◇ **inactivator** ◇ **ezniñver** g. -ioù Danvezenn en araez da astaliñ gwered un enzym.

inactivation ◇ **inactivation** ◇ **ezniñvañ, ezniñvadur g., ezniñverezh g.** Astaliñ gwerederezh bevoniel un danvezenn, sk. : *e.* ar glokaenn dre ar wrez, *e.* un toksin dre ar formol, *e.* un enzim dre un enzimdolc'her.

inactif, -iv-

• *aiguille creuse inactive placée sous contrôle radioscopique avant introduction d'un fil radioactif* nadoz kleuz anoberiek a sanker dindan reolerezh dre skinselliñ kent ebarzhiñ enni un neudenn skinoberiek • *cellules capables, en l'absence de complément, d'activer les anticorps jusque là inactifs* kelligoù en araez, en ezvezañs ar glokaenn, da enniñvañ an antikorfoù anniñvek betek eno • *enzyme inactivant la bradykinine* enzim oc'h ezniñvañ ar bradikinin • *inactivité complète de l'intelligence* peurangwerc'h ar reiz • *l'excipient est une substance inactive par elle-même* un danvezenn diwired drezi he unan eo an ambrougenn • *l'inactivité de l'antéhyppo-physe* angwezh ar rakgougorfenn • *l'indifférence affective et l'inactivité* an digasted kantaezel hag an anober • *le complément, inactif en lui-même* ar glokaenn, angwezhus diouti he unan • *les anticorps reconnaissent les antigènes et les inactivent en les agglutinant* an antikorfoù a naoua an antigenoù hag o ezniñv dre o dazgludañ • *précurseur inactif, transformé par la trypsine en alphachymotrypsine active* diaraoger anniñvek, treuzfurmet gant an tripsin en alfakimotripsin niñvek • *sérum dont le complément a été inactivé* gwadvez bet diwezhusaet e glokaenn.

inadaptation ◇ **maladjustment, social misfitness** ◇ **anzasadur g.** Stad un den na biao ket aozioù e berzhiadur er gedvuhez ha, dre se, araezioù e ziorreadur, dic'houest ma chom da c'hounit korvo gant ur saviad skolel, micherel, keodedel, h.a. ; tennañ a ra an anzasadur pe d'an den e unan dre benn un namm kreudel pe vredel (skorted arc'hwelel, kleñved, h.a.), pe d'an amveziadoù (kevredigezhel, armerzhel, politikel, h.a.).

inaniation ◇ **inanition** ◇ **disvezhur g.** Stad treuted ha negez eizhañ a-geñver gant un diouer magadur muiek ha padek, naous dre ur c'holl danvez er gwiadou behinek hag er c'higennoù (kulez) ha dre strafuilhoù an arc'hwelioù kreudel ha bredel (sl. *athrepsie, cachexie, dénutrition, émaciation*).

inaptitude ◇ **inaptitude** ◇ **diaraezded b.** Dic'halloud e-keñver ul labour, ur vicher, ur gefridi dre ziuver ar perzhioù kreudel pe vredel rekis ; e Frañs, e savel *hanren hollek ar C'hedskor* dindan an dezanvad Gl. *inaptitude au travail (diaraezded d'al labour)* stad un den goude 60 vloaz (goude 62 vloaz abaoe 2011), dezhañ un dic'houest 50 % da nebeutañ, na oufe kenderc'hel gant e labour micherel hep riskl evit e yec'hed (sl. *incapacité, invalidité*).

incapable majeur ◇ ◇ **angougoneg g. -eion muiek** Den dreist 18 vloaz tizhet gant daralladur e c'halloudezhioù kreudel pe e c'halloudezhioù bredel (kleñved, nammded, toc'hended) o herzel outañ a ezteurel e vennadoù, a ranker gwareziñ da geñver greadoù ar vuhez keodedel ; e Frañs, ez eus bet savelet tri derez argreskus e gwarezerezh an *a.m.* : ar *gwarded gwirel* (Gl. *sauvegarde de justice*), ar *wardoniezh* (Gl. *cura-telle*), an *heforzhouriezh* (Gl. *tutelle*).

incapacité, incapacité de travail ◇ **incapacity, inability, disability, industrial disablement** ◇ **dic'houested b., dic'houested d'al labour** Stad un den digresket e c'houested da labourat da heul ur c'hleñved pe un darvoud ; savelet ez eus bet derezioù en *d.* : an *d. amzeriat darnel, D.A.D.* (Gl. *i. temporaire partielle, I.T.P.*) ; an *d. amzeriat hollel, D.A.H.* (Gl. *i. temporaire totale, I.T.T.*) ; an *d. trebadek* (hep spi da wellaat) *invalid, D.T.D.*, (Gl. *i. permanente partielle, I.P.P.*) ; an *d. trebadek hollel, D.T.H.* (Gl. *i. permanente totale, I.P.T.*) (sl. *inaptitude, invalidité*).

incapacité pulmonaire ◇ **disability by respiratory insufficiency** ◇ **dic'houested dre skorted skevent, dic'houested skeventel** Dic'hallusted da ren ur vuhez reol dre benn un anaev skevent.

incidence ◇ **1 incidence 2 positioning in radiology 3 incidence** ◇ **1 dehaez, entreuiñ 2 dehaez 3 darvezusted b.** 1 (Keal fizikel) degouezh ur skin gant ur c'horreenn, sk. : *korn d.* (Gl. *angle d'incidence*). 2 (Keal skinourel) desezaed ar gouziviad e-keñver hordenn entreuat ar skinoù X, sk. : *d. adreñv-araok*, ar skin stur oc'h entreuiñ dre gein ar gouziviad, ar skramm o vezañ dirazañ. 3 (Keal reuziadoniel) niver eus degouezhioù ur c'hleñved, pe eus an dud bet klañvet en ur boblañs lavaret, en ur padvezh lavaret (sl. *prévalence*).

incidentalome, fortuitome ◇ **incidentaloma, incidentally discovered tumor** ◇ **ec'hoarom g.** Yoc'henn dizoloet dre zegouezh da geñver un imbourc'h renet war glask d'un anaev all ; adenomoù kaenuslounezhel e vez ouzhpenn an div drederenn eus an ec'hoaromou.

incipiens ◇ **incipiens** ◇ **enkerzhus aa.** A-zivout ur c'hleñved en e zeroù, sk. : *diabet enkerzhus*.

incision ◇ **incision** ◇ **flañchañ, flañch g., flañchad g., flañchadenn b.** Skejañ ar parzhioù meizh diwar-bouez ur benveg troc'hañ (erc'hel, h.a.).

incisive ◇ **incisor tooth** ◇ **rakdant g.** (l. : *rakdent*) Dant skejus unwrizienn loet e kreiz diaraog gwaregoù an dent.

incis-

• *appareil destiné à maintenir ouverte une incision chirurgicale* ardivink amkanet da zerc'hel digor ur flañch surjaniel • *contre-incision* adskejad • *béance incisive* amgeharz rakdentel • *incision allant de la trépanation jusqu'à la taille d'un volet osseux* enbenañ o vont adalek an trepanañ betek dazbidañ ur pann askorn • *incision chirurgicale de l'utérus gravide* flañchañ ar grozh vec'hiek • *incision chirurgicale du cœur* skejañ surjaniel ar galon • *incisure cardiaque du poumon gauche* ask agalon ar skeventenn gleiz • *incisure catacrote* ask katakrotek, ask dikrotek • *incisure pariétale* ask an askorn kitem • *incisure pré-occipitale* ask rakkilpenn • *lèvres de l'incision* brielloù ar flañchad • *suturer les lèvres de l'incision* krafaelañ brielloù an enbenadenn.

incitation ◇ **incitement** ◇ **annoz pao. & g., annozad g.** Luskañ un anadenn da c'hoarvezout, delankañ un erwezh, delanvadiñ un elfenn vev, dougen un organ da arc'hwelañ, termenou intentet a-wechoù gant kemeradur *broudañ, broudad*, evito da vezañ kempleshoc'h o ental ha ledanoc'h o erdal (sl. *excitation, stimulation*).

incit-

- *cette muqueuse utérine ectopique réagit aux incitations hormonales* erwezhiñ a ra hevelep glourgenn krozh ezlec'hiat ouzh an annozadoù hormonal.

inclinaison : **épreuve d'** ~ ◇ **tilt test** ◇ **proud an arstouiñ** Proud amkanet da c'houzout hag arbenn un ezwal eo an iswark warsavel : gourvez a ra ar gouziviad war un daol wint a lakaer da c'hwelañ betek diraz ur savlec'h nes d'an diazerc'h; da yaek e lakaer ar proud mar c'hoarvez, goude un amzer hir pe hiroc'h, ur vaganad pe un ezwal diwar gouezh ar gwask sistolel.

inclin-

- *bassin d'inclinaison anormale* lestr kammstouet • *démarche avec inclinaison asymétrique du corps* kerzhout en ur stouiñ digemparzh ar c'horf • *déviaton du globe oculaire vers le haut lors de l'inclinaison de la tête sur l'épaule homolatérale* uswariañ ar voull lagad pa stouer ar penn war ar skoaz a-gendu • *inclinaison anormale vers l'avant des incisives* stouadur anreol war raok ar rakdent • *inclinaison des doigts* fle ar bizied, bizfle • *inclinaison en avant du corps de l'utérus* stouadur war raok eus korf ar grozh • *inclinaison latérale de l'extrémité d'un ou plusieurs doigts* stouadur war gostez eus eizhaenn un pe lies biz • *inclinaison latérale de la tête fœtale* kosteziadur eus penn ar grouell • *l'axe du tronc étant incliné en avant et de haut en bas* ahel ar c'hef o vezañ a-stou war raok ha war draoù • *le rayon directeur ayant un angle d'inclinaison entre 10° et 20°* ar skin stur [...] dezhañ etre 10° ha 20° stou • *rangée de cils inclinée en arrière* rezad malgud drekstouet.

inclusion ◇ **inclusion** ◇ **entoueziañ, entoueziad** Kalvezder gwiaadoniel anezhañ ebarzhiñ ur pezh korfadurel en ur metou unaozek a lakaer da sonnennañ war-benn e droc'hañ e skejennoù moan.

inclusion de la dent de sagesse ◇ **impaction of the wisdom tooth** ◇ **kaeadur g. an dant furnez** Dic'hallusted da nodiñ evit an dant furnez gronnet gant askorn an aven.

inclusions cytomégaliqes : **maladie des** ~ ◇ **cytomegalic inclusion disease** ◇ **kleñved an ebarzhennoù I. (b.) kitomegalek** Kleñved diwar ur viruz eus ar stroll eror (kitomegaloviruz), naouus dre an dinodiñ eus ebarzhennoù bras e-barzh kitoplasm ar c'helligoù poreet; gant an nevezc'hanidi, tredizhet ent ganedigel, ar paotañ degouezhioù, ez erzerc'h e rezh un avufelc'husvent, ur purpura olpladanel, un amwad loezadel, ur gorrlopennegzh hag un tolgenluc'hsaefo; gant an oadourion, e wisk ar c'hleñved, dastumet peurliesañ diwar liestrezuskuilhadur, furm un azonid mononukleozvanek hag un avufelc'husvent o tedeñ ent emdarzh d'ar pare.

inclusions cytoplasmiques, deutoplasme ◇ **deutoplasm** ◇ **ebarzhennoù kitoplasmel, deutoplasm g.** Teskad an elfennoù enkitoplasmel danzeet gant ur gellig nad int ket parzhiat en danvez bev, tri seurtad anezho : al livegennoù, ar c'hadavennoù, ar greun borc'hañ.

inclusions intraérythrocytaires ◇ **intracorpuseular structures** ◇ **ebarzhennoù pe luniadoù eneritrokitel** Elfennoù luniek a weler e-barzh an eritrokite : ruilhenoù Cabot, ribozomoù dierc'het, greunanoù houarnin, hemogloblin dinaturet.

inclus-

- *conjonctivite à inclusions* kevresaefo ebarzhennek • *débris embryonnaires restés inclus dans l'organisme* aspadennoù rizhellel chomet engronnet er bevedeg • *endométriase incluse dans le myomètre* endometrioz enkloz er c'haheer krozh • *le liquide à analyser, inclus dans un gel* al liñvenn da elfennañ, entoueziet en ur gel • *matériaux métalliques ou plastiques inclus dans l'organisme* dafarennoù metal pe mezell ensteudet e-barzh ar bevedeg • *plaque par arme à feu, le projectile demeurant inclus dans le corps* goulid dre saezhell ebarzhat • *prothèse faciale incluse* dremmosod engronnet.

incomitance ◇ **incomitance** ◇ **ankedwarded b.** En ul loarkreuzh, daskemmadur derez an ankensteud pa gemm durc'hadur ar sell (sl. *concomitance*).

incompatibilité fœtomaternelle ◇ **fetomaternal blood group incompatibility** ◇ **digempad g. krouell-mamm** Stad o tisoc'h eus ar vezañs e hemati ar grouell eus antigenoù ezvezant e hemati ar vamm; pa dremen un nebeut ruzkelligoù eus ar grouell e-barzh gwad ar vamm, e tanze houmañ antikorfoù amredat en araez da dreuziñ an dorzhienn ha da zispenn hemati ar grouell douger an antigenoù; hogos bepred ez eo ar re-mañ parzhiat er reizhiad Rhesus (peurliesañ an antigen Rho pe D); eus ar c'henniñv etre hemati ar grouell douger ar barenn Rh (Rh +) hag an antikorfoù antiRh eus gwadveiz ar vamm e tinaou *kleñved gwadloezadel an nevezc'hanidi* (Gl. *maladie hémolytique du nouveau-né*) hag a-wechoù marv ar grouell *in utero*; un hent da zizarbenn an *d. k. m.* eo ensinklañ d'ar vamm gammaglobulinoù antiRh (pe antiD) evit dispenn enni an hemati krouellel (sl. *iso-immunisation*).

incompatibilité sanguine ◇ **blood incompatibility** ◇ **digempad g. ar gwadoù, gwaddigempad g.** Keñver etre daou c'houziviad hevelep ma ne c'haller treuzskuilhañ gwad an eil d'egile hep delankañ darvoudoù, peurliesañ peogwir e vez dazgludet ha loezet hemati ar roer gant an antikorfeñverek bezant e gwadveiz ar roadour, dibaotoc'h peogwir e vez e-barzh plasma ar roer antikorfoù en araez da zispenn hemati ar roadour (sl. *agglutinine, compatibilité sanguine, donneur universel dangereuse, groupes sanguins, histo-incompatibilité, système HLA*).

incompatible, -bilité

- *deux propositions mathématiques incompatibles* daou erganad jedoniel digembez • *forme extrême, incompatible avec la vie, d'achondroplasia* furm eizhañ, trankus, ar migornangwe • *histo-incompatibilité* digempad gwiadell, gwiadigempad • *incompatibilité entre deux fonctions* digembuzestet etre daou amaezh • *incompatible avec la vie, léta* trankus.

inconscience, perte de connaissance ◇ **unconsciousness** ◇ **koll g. kenskiant, digenskiant b.** (kemeradur mezegel) koll anaoudegezh an unan hag ar bed, dre berzh ar c'housked, an ezwal, ar c'homa, an dieraeziñ; da ziforc'hiñ diouzh ar c'hemeradur boutin : ezvezañs ar skiant varn, andassellegezh.

inconscient ◇ **unconscious** ◇ **1 digenskiant aa. 2 diemouez g. 3 diemouez aa. 4 diemouiziek** 1 Kollet gantañ anaoudegezh. 2 (Kemeradur bredelfennadel) reizhiad eus ar bred amparet gant an endalc'hedoù arvoustret, sk. : *trevnet eo an diemouez evel ul lavar* (Gl. *l'inconscient est structuré comme un langage*). 3 Lodek, perzh gantañ en diemouez, sk. : *kounlerc'hioù diemouez* (Gl. *traces mnési-ques inconscientes*) 4 o tioueriñ embreg an emouezañ (sl. *conscience*).

inconstant, -stamment

• *diverticule inconstant* bogod anarstal • *extension du gros orteil et inconstamment des quatre autres* astennidigezh ar meud troad hag, anarstal, ar bizied troad all • *tumeur à malignité inconstante* yoc'henn anarstal he yuted.

incontinence ◇ **incontinence** ◇ **andalc'h g.** Ec'hodiñ andiarvenn oulennoù (*kaoc'handalc'h*) pe troazh (*troazhandalc'h*) (sl. *encoprésie, énurésie*); gouziviad an andalc'h a lavarar ez eo *andalc'hek* hag ez eus anezhañ un *andalc'heg* (Gl. *incontinent*).

incoordination ◇ **incoordination** ◇ **digenurz b.** Diaester pe dic'halloud da drevnañ argrezadur ar c'higennoù engwezhiet er fiñvoù; kemm a lakaer etre *digenurz* hag *ankedre* (Gl. *ataxie*) e kement ma reer eus hemañ un digenurz eus ar fiñval diarvenn (sl. *asynergie, ataxie, cérébelleux : syndrome ~, coordination, dysmétrie, hypermétrie, tabès*).

incorporation ◇ **incorporation** ◇ **gougorfañ** (Bredelfennerezh) argerzh ma ra drezañ ar gouzrec'h d'un ergerc'henn, war ur mod eriuñnel, dont tre ha menel e-barzh e gorf (sl. *introjection*).

incrément ◇ **increment** ◇ **azvuiad g.** Gwerzhad arstalek ouzhpennet a-reizhiad d'ur braster pe d'un argemmenn (sl. *décément*).

incriminer

• *certain auteurs ont incriminé les traitements préventifs* • *ou l'exposition à des gaz toxiques* gant aozerion 'zo e voe kirieget ar mezegadoù ergurañ pe an ardizh ouzh aezhennoù pistrius.

incrust-

• *corps calcaire libre dans la lumière bronchique ou incrusté dans la paroi* korf razek dizalc'h en oaled ar vronkezenn pe amsiket er speur anezhi • *incrustation calcaire dans la paroi d'une artère athéromateuse* amsikad razek ebarzh speur un dalmerenn ateromatus.

incubation ◇ **incubation** ◇ **1 gouneriñ 2 gounervezh g.** 1 A-zivout un hadenn boretis entoet er bevedeg, an neriñ diazon anezhi. 2 Prantad ur poreadur etre an tredizhañ (enteiñ an hadenn bore) ha deroù an enneriñ (anadiñ an azonou kentañ) (sl. *acmé, contagion, invasion*).

incurable ◇ **incurable** ◇ **dibare aa.** Na c'hell ket parañ.

incurie ◇ **carelessness** ◇ **diemzamant, emwallegezh b.** Ezvezañs damant d'an unan a-fet naetadurezh, dilhad, emzalc'hioù, azon a stader gant bredklañvourion 'zo.

indemne

• *patient indemne de toute affection patente* gouziviad kuit a nep klañvadur erzerc'h • *transmission héréditaire d'une maladie d'un père à tous ses fils, les filles restant toutes indemnes* treuzkas hêrezhel ur c'hleñved eus un tad d'e holl vibion, e holl verc'hed o vezañ salv.

indépendant

• *animaux dont la température est indépendante de celle du milieu ambiant* loened a zo diamzalc'h o gwrezverk diouzh hini ar metoù • *contraction indépendante d'une seule fibre musculaire* argrezadenn digevret ur gaherwienn • *maladie indépendante* • *due à un virus identifié* kleñved dibar diwar ur viruz hennadet.

indéterminé

• *paraplégie dont la cause reste indéterminée* treuzseizi ansavelet e orin • *perversion du goût d'origine indéterminée* gwarder a 'n tañva a orin ansavelet • *répéter un nombre indéterminé de fois* liesarren.

index cardiaque ◇ **cardiac index** ◇ **ditourenn b. galon** Kementad gwad erlusket gant pep kofig e-doug ur munud dre vetr karrez eus gorread ar c'horf (ec'hongaster gorreel, $L^1 T^{-1}$), 3,2 l ent reol (sl. *débit cardiaque*).

index de concentration ◇ **concentration ratio** ◇ **argement g. bec'h** Keñver feur un danvezenn en troazh ouzh ar feur anezhi e plasma ar gwad.

index de morbidité ◇ **morbidity ratio** ◇ **feur g. kleñvel** (Reuziadoniezh) dregantad gouziviaded ur c'hleñved lavaret a-geñver gant niver poblañs ur rannbarzh pe ur stroll tud (bugale, oadourion, tud kurdiet).

index de mortalité ◇ **death rate** ◇ **1 feur mervel 2 argement mervel** (Reuziadoniezh) Dregantad marvoù diwar ur c'hleñved lavaret. 1 A-geñver gant niver ar boblañs. 2 A-geñver gant dregantad an holl varvoù.

index systolique ◇ **stroke index** ◇ **ditourenn sistol** Kementad gwad erlusket da geñver pep argrezadenn eus pep kofig dre vetr karrez eus gorread ar c'horf; ent reol etre 30 ha 50 mL.

index : déviation des ~ ◇ **index deviation** ◇ **gwariañ ar bizied yod** Embregad evit lakaat war wel un tizhad a 'r milendall : ar gouziviad o vezañ azezet hep harp kein a beder da astenn e zivrec'h en ur lakaat e vizied yod adal da re an imbours'her ha da serriñ e zaoalagad; treiñ a ra ar bizied yod war an tu m'emañ an anaf.

index

• *index mobile coloré utilisé pour explorer le champ visuel* steudenn heloc'h livek arveret da erc'hwiliañ ar gwelvaez.

indican ◇ **indican** ◇ **indikan** g. Deverad eus an indol, danzeet e unan diwar an triptofan gant bakteri ar pervez (dreist holl pa vez kevret negez piridoksin), a zo an tremen reñverek anezhañ en troazh (*troazhindikanegezh*, Gl. *indicanurie*) un erzerc'had eus goadurioù er pervez pe eus ur skorted avu.

indicateur coloré ◇ **colored indicator** ◇ **merker** g. -ioù dre liv Danvezenn o testiñ dre he liv stad fizikel ar metoù m'he endoder (ar pH da skouer) pe ar perzhioù kimiek anezhañ (merker dazgwered).

indicateur nutritionnel ◇ **nutrition indicator** ◇ **ditourenn b. vezhur** Er Vezhurouriezh, nep roadenn gementadel (savder, pouez, pleg kroc'hen, boued bevezet) en araez da bourchas stlenn a-zivout dedroadur aozioù emvagañ ur stroll tud.

indicateurs de santé ◇ **health indicators** ◇ **ditourennoù yec'hed** Brasterioù jedet diwar ar muzulioù graet war ur boblañs en amkan da andalañ ar stad yec'hed anezhi, ar re bennañ o vezañ ar feurioù kleñvel (darvezusted, revezusted) ha mervel, an hoali keitat.

indice (ou épreuve) d'hyperlipidémie ou d'hyperlipémie provoquée ◇ ◇ **feuriader (pe proud) an triglikeridwadv-vec'hiañ** pe **an triglikeridusvec'hiañ** pe **al lipidwadvvec'hiañ** pe **al lipidusvec'hiañ** Diforc'h etre al lipidwadvvec'hioù war yun ha 5 eurvezh goude ur pred ennañ 70 g glukid, 70 g protid ha 70 g lipid; ent reol, e sav ar gwadvvec'h lipid goude pred a etre 0,70 ha 2 g/l; muiaet e vez ar feuriader gant an arteriosklerozeion (etre 2,5 ha 3 g/l) ha dreist holl gant an aterosklerozeion, an diabeiteion ha gouziviad ar ksantomatoz.

indice acidophile ◇ **acidophil index** ◇ **feur trenkennlen** En ur gwiad, dregantad kelligoù lenidik o c'hitoplasm ouzh al livuzennoù trenkek, ditour lodek en imbours'hioù kellighormonel, an *f. t.* o vezañ uc'hek en ampoent ar vic'hadiñ.

indice anastimo-carpien ◇ ◇ **ditourenn savder-arzorn** Delun o tenaouiñ pouez reol (P) un den diwar e savder (S) hag amregad e arzorn (A) : $(S - 100 + 4C)/2 = P$.

indice biliaire plasmatique, IBP ◇ ◇ **ditourenn vestlel ar plasma** Niver o tenaouiñ bec'h al livegennoù bestlel er plasma muzuliet war eun dre livventerezh; ent reol emañ an niver-se etre 1,6 hag 1,8; sevel a ra betek 5 pe 6 pa anad an ikter.

indice comparatif ◇ **ratio** ◇ **argement g.** (Reuziadoniezh) Keñver etre daou zarvoud pe etre an un darvoud e div boblañs kevarall.

indice d'infection ◇ **infectivity rate** ◇ **feur poreañ** Niver dre gant a 'n dud tizhet gant ur c'hleñved (paludegezh) en un tared edoug ur prantad.

indice de coagulabilité ◇ ◇ **argement kaouledusted** Niver o tenaouiñ disoc'h ar proud gougemer ouzh an heparin *in vitro* (kaouledusted ar gwad); e jediñ a reer dre rannañ amzer gaouediñ an test dre hini ar gouziviad; pa vez = 1 e verk ur gaouledusted reol, pa vez > 1 an uskaouledusted, pa vez < 1 an iskaouledusted.

indice de gravité ◇ **severity index** ◇ **ditourenn c'hrevusted** Niver arveret da andalañ grevusted stad ur gouziviad darbennet en ur wazrann defraouerezh, ne vern pe arbenn e ve d'an entiadur anezhañ; da savelañ an ditourenn e talc'her kont eus pouezded an ezreolderioù klinikel ha bevoniel : soliañ a reer war 34 arventenn dasparzhet etre 8 gennad (nervel, kalongwazhiedel, analadel, kreuzpervezel, lounevezel, kennevidel, gwadel ha poreel); pep stadadenn a rezhienner dre un notenn etre 0 ha 4 hervez derez an ezreolder; an disoc'h a gevaraez andalañ riskl ar marv a-geñver gant an direizhoù stadet.

indice de masse corporelle ◇ **body mass index** ◇ **ditourenn dolz korf** Keñver ar pouez (e kg) ouzh karrez ar savder (e m); ar border a zespizer dre ar gwerzhadoù brasoc'h pe bar ouzh 30 (sl. *obésité, surpoids*).

indice de pression systolique ◇ **systolic pressure index** ◇ **argement gwask sistolel** Keñver etre ar gwask talmerel a-sistolel muzuliet e par an ufern ouzh an hini muzuliet e par ar vrec'h, sellet evel reol etre 0,55 ha 0,90; dindan 0,55 evel azonus d'ur skorted talmerel en izili traoñ.

indice de résistance cardiaque ◇ ◇ **ditourenn gadarni ar galon** Niver disoc'h ar riñvenn :

$$(P_1 - 70) + 2(P_2 - P_0)/10,$$

P_1 o vezañ niver ar poulzadoù dre vunud goude 30 kluchadenn graet dindan 45 eilenn, 70 poulz keitat un den yac'h 20 vloaz, P_2 niver ar poulzadoù ur munud goude deroù kemeradur P_1 , P_0 o vezañ poulz ar gouzrec'h azezet, er paouez; merk ur galon nerzhiek eo un ditourenn etre 0 ha 5, ur galon geitat etre 5 ha 10, gwan etre 10 ha 15, dreist 15 ez eo naouus d'ur galon deusk.

indice parasitaire ou plasmodique ◇ **parasite index** ◇ **feur arvevadezh** Niver dre gant a 'n dud a stader d'un ampoent bezañs arvevaded en o gwad.

indic-, indiqu-

- *allergie contre-indiquant l'administration de pénicilline* allergiezh o tiennegañ diounit ar penikillin
- *douleur violente indiquant le début d'une péritonite* laur taer oc'h erzerc'haat deroù un ampeleñfo
- *indice d'écoute* feuriader andav
- *indice de réfraction* feuriader gouskogañ
- *l'ACTH est prescrit dans les mêmes indications que les glucocorticoïdes* erskrivañ a reer an ACTH en hevelep ennegadoù hag ar glukokortikoidoù
- *le trou dans le mur est l'indice d'un tir* arverk un tenn eo an toull er voger
- *une contre-indication de l'aspirine* un dizennegad d'an aspirin.

indifférencié ◇ **indifferentiated** ◇ **andiforc'hek** A-zivout un hanwe a zo argizus e naousterioù kelligel ha gwiad e-keñver ar gwiad ez evod dioutañ.

indiffér-

- *apathie progressive avec indifférence* ankewant argreskus gant aneroug
- *électrode indifférente dans les dérivations électrocardiographiques unipolaires* elektrod digas en amdregadoù kalonvarwezadel unvlein
- *incapacité de passer à la réalisation*

d'un acte sexuel par indifférence dic'houested da ren ur gread revel dre zigasted • *indifférence à autrui* digasted ouzh an amgen • *tumeur indifférenciée* yoc'henn andiforc'hek • *indifférence affective* digasted kantaazel, aneroug.

1 indigène 2 indigène, autochtone ◇ **indigenous** ◇ **1 broien aa. 2 broat aa.** 1 A zo bet ganet er vro, a-gevenep da *arallhin* (Gl. *exotique*), e kemm ouzh *henvroat* (Gl. *indigène*), (poblañs) annezet a-bell er vro. 2 A-zivout ur pore dastumet er vroezenn m'emeur o chom (a-zivout ar baludegezh pergen).

indirect

• *anesthésique local et sympathomimétique indirect* dieraezec lec'hiek ha simpatomimetek ameeun • *bilirubine libre, indirecte, non conjuguée* bilirubin ameeun, ankeveil • *enregistrement indirect du nystagmus spontané* lerc'hwezañ ameeun an nistagmuz emdarzh • *infection transmise par le contact interhumain direct ou indirect* poread treuzkaset dre ar stekiñ etredenel eeun pe ameeun.

individu(-)

• *cellule individualisée morphologiquement* kellig hiniennaet ent neuziadurel • *décision individuelle d'accorder un Certificat d'Études Spéciales à certains inter-nes* disentez da-hinienn debarañ un Testeni Studi Arbennik da ziabzarhiaded 'zo • *méthode d'individualisation des individus* hentenn bivaderezh an denion • *individu possédant une population de cellules étrangères* hinienn a zo parzhiat enni ur c'hread kelligoù allevek.

inductance ◇ **inductance** ◇ **dereogi b. (UI-1T)** (Tredanouriezh) Rannad an derenlanvad (UT, Gl. *flux d'induction magnétique*) paret en ur veni gant ur red tredan, dre ar read anezhañ.

inducteur¹ ◇ **inductor** ◇ **dereer aa. & g. -ioù** (Tredanouriezh) Dec'haner an deren (sl. *induction I*).

inducteur² ◇ **inductor, activator** ◇ **kevelreer g. -ioù** (Rizhelloniezh) Eginenn lodok er rizhell o telankañ en eginennoù kefin an diorren hag an diforc'hekaat anezho, an araezusterioù kevelreet enno o vezañ kevarall diouzh re ar c'hevelreer (sl. *induction 2*).

inducteur³ ◇ **inducer** ◇ **iser g. -ioù** (Hiloniezh) Danvezenn danzeet gant ar gen reoliñ hag en araez da heudiñ ar goudaverioù hag e se da gevaraezañ enaoz an RNA kannad hag ar proteinoù (sl. *dérépression, gène, induction 3, répresseur, ribonucléique : acide* ~).

inducteur⁴ ◇ **starter** ◇ **dehater g. -ioù** (Surjianerezh) Danvezenn arveret evit deraouiñ an dieraezñ hollek.

induction ◇ **induction** ◇ **1 deren 2 kevelren 3 isañ 4 dehatiñ** 1 Delanvad gwarellec ur red tredan, da ventadoù dezhañ : *derenvaez* (UL⁻²T, *i. magnétique*), *douenvaez* (IL⁻²T, *i. électrostatique*), h.a. (sl. *inducteur*¹). 2 A-berzh un eginenn, delankañ diorren ha diforc'hekaat eginennoù all (sl. *inducteur*²). 3 A-berzh ur c'henenn, heudiñ goudaverioù (sl. *inducteur*³). 4 Lankad kentañ an dieraezñ hollek, anezhañ enkouskiñ ar gouziviad dre un huneiad engwazhiennel pe dewentadel hag, e troioù 'zo, ur sankadenn gurar (sl. *anesthésie générale, 3 hypnotique, inducteur*⁴).

induration ◇ **induration** ◇ **argalediñ, argaledad g.** Fetisaat ar gwiadoù.

infanticide ◇ **infanticide** ◇ **ablazhañ, mablazh g.** Muntrañ un nevezc'haned pe ur grouell (bevus pe get) adalek deroù seizhvet mizvezh ar vrazzedd.

infantilisme ◇ **infantilism** ◇ **bugelvanegezh b.** Arvez kreudel pe vredel un oadour o tennañ da neuzioù ur bugel : savder bihan, diouer diorreadur an organoù genel, ezvezañs an eilarouezioù revel, mibiliezh an neuzid hag ar realezh ; deskrivet ez eus bet lies rizh eus ar vugelvanegezh : *b. c'hanadel* (Gl. *i. génital*), *b. c'hougorfennel* (Gl. *i. hypo-physaire*), *b. viskoedennel* (Gl. *i. dysthyroïdien*), h.a.

infantilisme type Gandy, infantilisme régressif ou tardif ◇ **tardy infantilism** ◇ **bugelvanegezh diwezhat pe argiz-adel** Argizadur an arouezioù revel o c'hoarvezout e-tro 30 pe 40 vloaz, war un dro gant dinod an arvez kreudel ha bredel bugelvanek hag ensiladur miksedem-atus an amwiskadoù, o tedreiñ a-nebeudoù d'ur gozhiadegezh kentrat ; azoniad arzodet da skorted gwagrennoù enborc'hañ 'zo.

infantilisme type Lorain, infantilisme hypophysaire, chétivisme ◇ **Lorain's infantilism, hypophysial infantilism** ◇ **bugelvanegezh rizh Lorain, bugelvanegezh c'hougorfennel, teuskegezh b.** Seurtad bugelvanegezh naouus dre un izilded hollek, neuzioù freilhennek ha hegenfeur, a-wechoù dre ezvezañs an arc'hwelioù ganadel.

infantilogigantisme ◇ **gigantism with symptoms of infantilism** ◇ **bugelvankeuregezh b.** Keuregezh kevredet gant azonoù bugelvanegezh : ezvezañs an eilarouezioù revel, bred mibilieus.

infarcissement ◇ **infarction** ◇ **amfuiñ, amfuad g.** Marvennad gwadliñvel kantet e diabarzh un organ da heul steviadur ur wazhiedenn.

infarctus ◇ **infarct, infarction** ◇ **angwazhiad g.** Anaf deskrivet ar wech kentañ gant Laennec en despizas evel un ensilad gwad en ur flugezenn ; annon heskwadek marvennet (gant pe hep ensiladur gwad) diwar steviadur un dalmerenn e diabarzh un organ ; ent klasel e teskriver an *a. gwenn, amwadek pe heskwadek*, evel angwazhiad al lounezh, hag an *a. ruz, orc'hadek* pe *gwadliñvek* evel angwazhiad ar skevent.

infarctus de l'intestin, infarctus entéromésentérique ou méésentérique ◇ **intestinal infarction** ◇ **angwazhiad ar pervez pe ar gandedenn, angwazhiad pervezkandedennel, azoniad heskwadel ar pervez** Azoniad kof lemm diwar skorted trumm an amred gwad e tachad uhelañ ar gandedenn (enfroù pe dromboz) o tec'han amfuadur en un tamm bras pe vrasoc'h eus speurenn ar pervez hag ar gandedenn gefñverek hag o tisoc'h gant tanailh an ampeleñn hag un antreizh pervez grevus.

infarctus du myocarde ◇ **myocardial infarction** or **infarct** ◇ **angwazhiad ar c'haheer kalon** Marvenn en un tachad eus ar c'haheer kalon e diouer an eroueriañ, hogos bepred da heul tromboz ur gurunerenn, erzerc'h peurliesañ dre ur c'hevenkez grizias ha kilvers, daralladoù kalonvarrezadel, gwadusvec'h enzimoù 'zo (CPK, MB, LDH, ASAT, mioglobin, miozin, troponin), daskemmadou hanannel eus argrezusted ar c'hofig kleiz, erzerc'h er stenwerañ; hervez an dalmerenn steviet, an *d. etre-kofigoù* araok, an *d. gela'hplegek* pe an *d. guruner* dehou, e stader tri lec'hiadur eus an *a.k.k.*, a-gelep : raogtilhennel, raogkostezel pe diadraoñ; rouestlodoù a zeskriver, er prantad lemm : skorted kalon, darvoudoù trombozenfraouel, fregadur speur pe kigennoù begennek ar galon, diwezhatoc'h : darvonn ar c'hofig.

infarctus pulmonaire ◇ **pulmonary infarction** ◇ **angwazhiad skevent** Amfuadur diwar wadliñvañ en un tachad eus parenkim ar skevent (logigoù ha speurioù) o tisoc'h peurliesañ diouzh steviadur ur barr eus kef ar skevent, anezhañ annon en ervez da varvennañ pe da steuziañ.

infécondité ◇ **sterility** ◇ **angouennañ, angouennusted** b. Na gaout bugale; an hilastaliñ zo un araez a 'n angouennañ devredet.

infecter ◇ **to infect** ◇ **1 poreañ 2 louezañ** 1 A-berzh hadennoù kleñvedel, enteñ er bevedeg ha neriñ. 2 A-zivout ur metoù bevel (liñvenn da ensinklañ) pe oberatael (kroc'hen ha dafar), bezañ gouziblet gant hadennoù lestek (sl. *contamination, désinfection*).

infectieuse : **maladie** ~ ◇ **infectious disease** ◇ **pore** g. -où Kleñved diwar c'harvevion o neriñ hag o tec'han anafoù er bevedeg.

1 4 infectieux 2 malade infectieux 3 infectieux, infectant ◇ **infectious, infective** ◇ **1 poreek aa. 2 poreeg g. -ion 3 poreis aa. 4 poreel** b. 1 Gant ur pore pe ur poread. 2 Gouziviad poreek. 3 En araez da zec'han pe da dreuzkas ur pore pe ur poread, sk. : *livant poreüs* (gl. *chancres infectants*). 4 A-zave d'ar pore, sl. *an anaezioù lestel ha poreel* (Gl. *les affections septiques ou infectieuses*).

infectiologie ◇ **infectiology** ◇ **poreouriezh** b. Diskiblezh vezegel o plediñ gant ar poreoù.

infectiologue ◇ **infectiologist** ◇ **poreour** g. -ion Mezeg arbennigour war ar poreoù.

infection ◇ **infection** ◇ **1 poreañ 2 poreadur g., poread** g. 1 A-zivout garvevion, enteñ, neriñ ha devoudañ dizurzhioù e-barzh ur bevedeg. 2 Stad ur bevedeg aloubet gant garvevion (bakteri, virus, foue, arvevad) en araez da neriñ ha da zec'han anadennoù kleñvedel (anafoù, erwezhoù hangaeel); pa na vez ket erzerc'hadoù klinikel e komzer eus *poreadur enkelat* (Gl. *infection occulte* pe *inapparente*), eus *poreadur diskelat* (Gl. *infection patente*) pa vez diouto; pa vez garvevion bezant er bevedeg hep devoudañ ennañ strafuilh ebet, e reer eus ar gouziviad un *douger yac'h* (Gl. *porteur sain*), ha n'eus ket anv ken eus poreadur, met eus *dougerezh* (Gl. *portage*).

infection opportuniste ◇ **opportunistic infection** ◇ **poreadur koulzataer, poreadur kevaraezet** Poreadur dre hadennoù anavezet evel amgeuziat, o vont anialek hag en araez da zec'han rouestlodoù grevus dre benn m'emañ ar gouziviad er stad a zivig hangaeel (sl. *bactéries opportunistes*).

infection ou **maladie sexuellement transmissible, MST** ◇ **venereal infection or disease, VD** ◇ **poread pe kleñved revdreuzkasadus, KRT** Kleñved tredizhus dastumet dre ar c'hediadoù pe an diastokoù revel : sifiliz, blennorragiezh, livant meizh, kleñved Nicolas-Favre, granulom barlennel hag anaezioù troazhganadel diwar bakteri, viruzoù hag arvevaded o trigañ war ar glaourgennoù : *Chlamydia, Candida, Trichomonas*, viruz an eror, an avufo B, an haza, h.a.

infectiosité ◇ **infectiousness, infectivity** ◇ **poreüsted** b. Perzh bezañ poreüs, piaouañ ur galloud poreañ (Gl. *pouvoir infectant*).

infériorité : “**complexe**” ou **sentiment d'~** ◇ **inferiority “complex”, sense or feeling of inferiority** ◇ “**kemplezh**” b. pe **santad** g. **an tru** pe **an istalvoudegezh** Hervez Adler, kentradur an termenou-se, santad soliet en ur gwander organel gwerc'hel a strivfe an den d'e gempouezañ, gwikefre a ve en orin an holl neurozioù; Freud a ziorzhas tezennoù ar raklenad organel hag an dianlenad hollek dre loañ santad an tru e-touez an azonoù neuroz.

infertilité ◇ **infertility** ◇ **anfrouezhusted** b. Dic'housted da engehentañ bugale (sl. *fécondabilité, fertilité, infécondité*).

infestation ◇ **infestation** ◇ **erialañ, erialerezh** g. 1 (Kemeradur klasel) a-berzh un arvevad angarvevel, enteñ er bevedeg pe festañ ouzh an amwiskad anezhañ; en destladur hizivaet e strishaer erdal an erialañ d'an artropod amarvevat. 2 (Paludegouriezh) bezañ moustiked en un tared.

infiltration ◇ **infiltration** ◇ **fibliñ, fiblerezh** g. Gwezh amkanet da verzañ ar geventrac'h, anezhañ klozañ muzelloù ar c'hourzh pe ar veskenn dre sankañ a-dreuz dezho ul lagadenn vetal.

infiltrat ◇ **infiltrate** ◇ **ensilenn** b. 1 Termen Gwiadoniezh oc'h arouezh un anaf skevent anhevonn naous dre aloubadur al logigoù gant un naouezenn foel. 2 Er Skinouriezh, demerenn un nebeut kentimetroù treuzkiz, fetis, unneuziek ha hevonn, pe rouez, nivlennek hag anhevonn.

infiltrat labile du poumon ◇ **transient infiltration of the lung** ◇ **ensilenn hesteuz ar skevent** Termen kinniget evit arouezh demerennoù padennek kuñv stadet dre ar skinimbourc'h da geñver skeventanaezioù diseurt (grip, drev, ornitoz), gwad-naouedoù, arvevadegezhioù.

infiltration ◇ **infiltration** ◇ **1 ensilañ, ensilad** g., **ensiladur** g. **2 ensilañ, ensiladur, ensilerezh** g. 1 Aloubidigezh ar gwiadoù, ar gwiad kellaouek pergen, gant ul liñvenn vevel (levruzenn ar gouliñv, gwad, troazh, lin, h.a.), gant ul liñvenn ensinklet

(dileizhad kengrennek, h.a.), gant aezhennoù (emfizem dangroc'henn, breinged goüs) pe gant dispak ur gwiad hanweek. 2 Ensinklañ ul liñvenn dieraesus e diastok ur gangrenn pe un nervenn (simpatek pe santadel) a venner astaliñ ent padennek he arc'hwelerezh.

infiltr-

• *éruption de papules infiltrées, dures, rouges* dispuilhad krugenoù ensilet, kalet, ruz • *formes infiltrantes d'une tumeur maligne* furmoù ensiladek ur yoc'henn yud • *méningite lymphocytaire avec infiltration des plexus choroïdes* pilhonfo lemm gant amfud ar rouedadoù tolgennek.

infime

• *agissant à des concentrations infimes* gweredus a vec'hiou boc'hedel • *quantité infime d'oxygène* boc'hed oksigen.

infirme, handicapé ◇ **disabled** ◇ **1 nammet** aa. **2 nammed** g. **-idi** 1 Gant blinded arc'hwelioù kreudel pe vredel. 2 Den nammet.

infirmier ◇ **hospital attendant, nurse, male nurse** ◇ **klañvdiour** g. **-ion** Den testeniekaet, oc'h embreger ar vicher a eiler mezegel, warnañ lies kefridi : arouelañ ar re glañv, perzhiañ en diarbennoù ergurañ, stummañ ha sterniañ.

infirmité ◇ **physical disability** ◇ **namm** g., **nammed** b. Darallad trebadek un arc'hwel eus ar bevedeg, enganet pe arzeuet ; hennadoù lezenvezegel eo al *liesnammed* (Gl. *infirmités multiples*) e dianlen an un darvoud hag ar *gevnammed* (Gl. *infirmités consécutives*) diwar lies darvoud kevarall.

infirmité motrice cérébrale ◇ **cerebral palsy** ◇ **nammed loc'hadel aempenn** Stad kleñvedel andedroüs diwar un divig enganet pe arzeuet abred tre eus kreizennoù loc'hadel an empenn, o c'hoarvezout eus ur seizi, un digenurzh ha strafuilhoù all a 'l loc'hañ, kevredet alies gant direizhoù santadel, skiantennel, kantaazel ha bredel.

inflammation ◇ **inflammation** ◇ **tanijenn** b., **fo** g. Ent klasel, teskad anadennoù erwezhiat ouzh un hegadenn en ur poent eus ar bevedeg, erzerc'h dre bevar azon : gwrez, laur, ruzder, koeñv (pevarzueg Celsius) ; despizet hiziv evel un argerzh hollek, er bevedeg a-bezh pe en ur rannbarzh anezhañ, oc'h erwezhiat ouzh ur c'heuziad a natur gimiek, fizikel, bakteriel, viruzel, antigenel, naouus a) dre anadennoù gwazhiedloc'hadel (ruzder, gouliñv), neuze kelligel (erwez al leukokit, tregenk), erfin gwiael (paotañ ar fibroplast, kleizennañ), b) dre anadennoù hangaeel, hanteradoù kimiek (histamin, kininoù, h.a.), kitokinoù, bonadoù rez, klokaenn, prostaglandinoù, leukotrienoù ; war un dro, muiadur a 'n tizh gouzediñ, gwadusvec'h fibrinogen, h.a. ; lemm, goulemm pe henek e c'hell bezañ an danijenn ; ha hi erwez difenn ar bevedeg, emañ en ervez da zedreñ ezreol ha da zelankañ anaezioù a ranker diounit outo enepfoeier steroidel (EFS, kortikoidoù) pe ansteroidel (EFAS, aspirin, h.a.) (sl. *anti-inflammatoire*).

NOTENN : Arveret e vez ivez Br. *fo* evel lostger kevatal da Gl. *-ite*, Sz. *-itis*, sk. : *empennfo*, Gl. *encéphalite*, Sz. *encephalitis*.

inflammatoire ◇ **inflammatory** ◇ **tanijennel** aa., **foel** aa. A-zave d'an danijenn, d'ar fo (sl. *enflammé*).

influence : **1 idées d'~ 2 délire d'~** ◇ **delusion of influence or of being controlled** ◇ **1 buhezadoù** l. (g.) **enkrog 2 ambren** b. **enkrog** Furm eus an darc'hwelerezh bred : 1 dergoaliñ bezañ dindan veli un amgen o kentodiñ an ambredañ (kantaezañ, devezout) hag ar realañ an unan. 2 Eil derez an argerzh : mont ar buhezadoù enkrog e rezh un trevnad dezhañ e gemez (sl. *automatisme mental, délire, hallucination, psychose délirante*).

influx nerveux ◇ **nerve impulse** ◇ **nervlanv** g. Barr niñ o treledañ dre an aksonoù, anezhañ ur pebeilad divleinekaat advleinekaat, disoc'h eus tremen distremen an ion natrium ha kaliom dre ionganoù koc'henn an neuron ; roll an nervlanv eo treuzkas ar slenn santadel ha loc'hadel etre an nerved kreiz hag ar peurrest eus ar bevedeg.

infraclinique ◇ **subclinical** ◇ **anerzerc'h** aa. A-zivout un anaez hep erzerc'had klinikel ha na c'haller dinoñ nemet dre imboure'hiou amglinikel.

infraclusion ◇ **infraclusion** ◇ **gougehaz** g. Ezvezañs keharzañ gant un pe lies dant (sl. *articulé dentaire, malocclusion, occlusion*).

infradiathermie ◇ **Hertzian waves therapy** ◇ **trewrez** g. pe **trewrezañ (hertz)** Dedalvezañ ar gwagennoù hertz el berr d'ar yac'hadurezh (sl. *diathermie*).

infradien ◇ **infradian** ◇ **danzeziat** aa. A-zivout ul luskellad korvezek (Gl. *oscillation cyclique*) berroc'h eget an devezh ; ur gorvez danzeziat (Gl. *rythme circadien*) zo dezhi un drovezh dindan 24 h (sl. *chronobiologie*).

infraduction ◇ **infraduction** ◇ **traoñduañ** Fiñv gouzizañ a-zerc'h (a 'l lagad da skouer) (sl. *supraduction*).

infragnathie ◇ **infragnathia** ◇ **avenissav** g. Skorted diorreadur a-zerc'h un pe an div aven (sl. *allélognathie, brachy-gnathie, dolichognathie, endognathie, exognathie, macrognathie, micro-gnathie*).

inframastite ◇ **submammary mastitis** ◇ **danvronnfo** g. Morfer er gwiad kellaouek etre gwagrenn ar vronn ha speur ar brusk.

infrason ◇ **infrasonic vibration** ◇ **issten** g. Froum stenek re izel e dalm da vezañ klevet (dindan 15 hertz evit an den).

infrasonothérapie ◇ **infrasonic therapy** ◇ **isstengurañ** Prederiañ dre an isstenioù.

infrathermothérapie ◇ **infrared rays therapy** ◇ **danruzkurañ** Prederiañ dre ar skinoù danruz, dezho gwered gwreziñ dreist holl.

infundibulectomie ◇ **infundibulectomy** ◇ **kernennezvenañ** Dazbidañ parzh usventek speurioù ar gennenn dalmerel e-kezh erougurañ surjiañ ar c'halonnaouedoù enganet kevret gant skoilh istrapig ouzh kef ar skevent (triadezh ha pevaradezh Fallo) (sl. *infundibulum NOTENN*).

infundibulotomie ◇ **section of the conus arteriosus** ◇ **kernennenbenañ** Digeriñ surjanel, dindan skoevredad, speur ar germenn dalmerel e sell da ziraez diabarzh ar c'hofig, lankad kentañ eus ar c'hernennezevenañ pe eus serradur ar c'hehentaed etrekofigoù.

infundibulum ◇ **infundibulum** ◇ **founilh** g. Luniadur korfadurel e stumm un trezer, sk. : *founilh ar sileg* (Gl. *infundibu-lum de l'ethmoïde*).

NOTENN : An elfenn anvet : PNA *conus arteriosus* pe *infundibulum*, Gl. *infundibulum du ventricule droit*, Br. *krennbikern talmerel* pe *founilh* a anver hiziv : TA *conus arteriosus*, Gl. *cône artériel*, Br. *kernenn dalmerel*. Notomp e kendalc'h ar surjianed da arverañ Gl. *infundibulectomie*, *infundibulo-tomie* (sl. *cône artériel* + *ERRATA GEVEZ-5*).

infusion ◇ **infusion** ◇ **glec'hañ**, **glec'h** g. -ioù, **glec'hiad** g. -où Angevezh graet dre skuilhañ dour berv war un danvezenn (struzhel peurliesañ) evit douhenniñ ar gwezhuzennoù anezhi (sl. *décocté, décoction, macération*).

NOTENN : Kevatal eo Sz. *infusion* da 1) Br. *glec'hañ*, 2) Br. *trefennañ*.

infusoires ◇ **infusoria** ◇ **infuzor** s. & g. Protozoed a zo ouzh gorreenn o c'horf un niver bras pe vrasoc'h a vlevanoù kreniat, enno div graoñell : ur *makronukleüz* struzhel hag ur *mikronukleüz* adel ; un infuzor eo *Balantidium coli*, arvevad an den.

ingénierie médicale, génie médical et biologique, génie biomédical ◇ **medical engineering** ◇ **ijin** g. **mezegel, Mezegijinouriezh** b. Skourr obererezh amkanet da ijinañ ha dewerc'hañ an ardivinkoù kemplezh arveret er vezekniezh evit deznaouiñ ha prederiañ.

ingesta ◇ **ingesta** ◇ **euvradoù** l. (g.), **ingesta** l. Anvad rumm oc'h arouezñ ar bouedoù sonnel pe liñvel ; termen arveret dreist-holl a-gevenep d'an *diouladoù* pe *ekskreta* ha d'ar *c'hac'hadoù* pe *egesta* (sl. *egesta, excréments*).

ingrédient

• *ingrédient des médicaments officinaux et magistraux* kentaozad ar bon- hag ar mestrangevezhioù • *la base est le principal ingrédient d'un médicament* kentaozad pennañ ul lia eo ar bon • *on distingue les additifs des ingrédients* diforc'hiñ a reer an arodadoù diouzh ar c'hentaozadoù • *pommade qui sert d'excipient pour les substan-ces médicamenteuses et d'ingrédient pour les préparations cosmétologiques* ogan danvezet da ambrougenn d'ar gwezherioù mezegel hag evel kentaozad en angevezhioù gwezeladel.

inhalation ◇ **inhalation** ◇ **dewentañ, dewentadur** g., **dewenterezh** g. 1 Sugañ aezhennoù, burezhioù pe aerosolioù dre ar forzhioù analañ war un amkan prederiañ. 2 Enteñ danvezennoù sonnel pe liñvel er forzhioù analañ (sl. *absorption, aérosol, fausse route, pneumoconiose*).

inhibine ◇ **inhibin** ◇ **inhibin** g. Protein dourzileizh, ansteroidel, a orin gonadel, borc'het e-barzh ar glidenn gant kelligoù Sertoli hag e-barzh ar virez gant kelligoù an haen c'hreunek ; dre gorwered e c'hevonn : a) er c'hougorfenn, paridigezh ar gonadostimulin, b) er gouzerc'hvel, paridigezh ar gonadoliberin, c) er gwagrennoù genel, neridigezh ar spermatogoni ha borc'hadur ar progesteron.

1 inhibiteur, inhibant 2 inhibiteur ◇ **1 inhibitory, inhibitive 2 inhibitor** ◇ **1 heudus** aa., **heuder** aa. **2 heuder** g. -ioù 1 O heudiñ. 2 (Kimiezh) elfenn en araez da leiaat pe da astaliñ gwered un danvezenn vevel, da c'horrekaat pe da herzel un dazgwered (enzimatek da skouer) en ur venel anked ; (Bevedouriezh, Bredoniezh) elfenn, parronn o c'hevonnañ pe oc'h astaliñ embreg an arc'hwelioù kreudel (nervel, loc'hadel, santadel, enzimatek, molekulel, h.a.) pe bredele (kefredel, kantaazel, revel, h.a.) (sl. *amplificateur, catalyseur, inducteur³, inhibition*).

inhibiteur calcique, calcium-bloqueur ◇ **calcium antagonist, calcium channel blocker** ◇ **kalkiomdorc'her** g. -ioù Danvezenn en araez da c'hevonnañ entoadur an ion kalkiom er gwiennoù kaher rizennek ha levn ; dre berzh o gwered war ar c'hahe kalon e tiounezed ar k. ouzh ar c'hevenkez, hiziv ez erskriver reoù anezho ouzh ar migorvez hag an uswask talmerel ; gant *Aozadur Bed ar Yec'hed* eo bet rummet ar k. etre ar k. *diuzel* (Gl. *i. c. sélectifs*), gwezhus war an ionganou er galon hag er gwazhied (enepmigorvez hag enebuswask), hag ar k. *andiuzele* (Gl. *i. c. non sélectifs*), o werediñ war ar gwazhied trobarzhel dreist holl.

inhibiteur de la monoamine oxydase (MAO) ◇ **monoaminoxidase inhibitor (MAOI)** ◇ **heuder ar monoaminoksidaz (HMAO)** Anvad rumm an danvezennoù oc'h enebñ ouzh an enzim-se ec'haozus d'ar monoaminoù ; anezho enepgouvideier efedus, diaes da arverañ avat en askont d'ar barradoù uswask grevus delanket dre o c'henvezañs er bevedeg gant bouedoù a zo tiramin enno (keuz, bananez, soja) (sl. *monoamine*).

inhibition ◇ **inhibition** ◇ **heudiñ, heudadur** g., **heuderezh** g. Termen hollek arveret e lies diskiblezh evel heñvelster da leiaat, gevennañ, gorrekaat, skoilhañ, tolc'hañ, herzel, astaliñ, ezniñvañ, skurziñ (sl. *désinhi-bitton, inhibiteur*).

inhib-

• *des inhibiteurs ou inactivateurs peuvent arrêter le déroulement de l'activation du complément* harzerioù pe ezniñverioù a c'hell skoilhañ ouzh dibun blivaerezh ar glokaenn • *facteur inhibant la sécrétion d'hormone mélanotrope* heuderenn vorc'hañ an hormon melanotropiek • *facteur inhibiteur de la migration des leuco-cytes* parronn heuder emdizh al leukokit • *inhiber la réabsorption tubulaire du sodium* heudañ dassugañ tuellennel an natriom • *inhiber ou déclencher la sécrétion de stimuline* degas skoilh pe lank en enborc'hañ ar stimulin • *inhibiteur de la pompe à protons* heuder ar porzher proton • *inhibiteurs de la fibrinolyse* skoilhañ ar fibrinloezhañ • *la désinhibition ou libération des centres nerveux inférieurs du contrôle des centres supérieurs* diheudañ pe dieubiñ ar c'hreizzennoù nervel izelañ diouzh reolerezh ar c'hreizzennoù uhelañ • *les inhibiteurs de l'enzyme de conversion* tolc'herioù an enzym amdreñ • *les notions d'inhibiting hormone et de releasing hormone* ar c'healioù a skoilhañ hag a elloerenn • *levée d'inhibition* lemel an heudiñ.

init-

• *la localisation initiale d'un cancer et des métastases* kentsez ur c'hankr hag an dasseziou • *la perte de l'initiative motrice chez le catatonique* koll ar c'hentodiñ er fiñvou gant ar c'hataoneg • *le segment initial du colon droit* rann derou ar c'holon dehou • *un mouvement initié par le soignant* ur fiñval diwar gentod an aroueler.

injection ◇ **injection** ◇ **ensinklañ**, **ensinklad** g., **sankañ** g., **sankadenn** b. Ebarzhiñ dindan wask ul liñvenn pe un aezhenn en ur gavenn naturel pe gleñvedel (en ur wazhiedenn pe en ec'honenn ur gwiad, sk. : *e. endermel* (Gl. *i. intradermique*), *e. endan-groc'hen* (Gl. *i. sous-cutanée* pe *hypodermique*), *e. enkaherel* (Gl. *i. intra-musculaire*), *engwazhiennel* (Gl. *i. intra-veineuse*), *entalmerennel* (Gl. *i. intraartérielle*), *h.a.*; *e. engouinel* (Gl. *i. vaginale*), *e. enkrozhel* (Gl. *i. intra-utérine*), *e. enkantraozhel* (Gl. *i. urétrale*), *h.a.*; *e. aer pe nitrogen er c'hrezoù*, *en ampeleñ*, *h.a.*; *e. e gwazhied ur c'helan*; *e. un Xdemerenn*, *h.a.*.

injection déchaînante ◇ **releasing injection** ◇ **ensinklad g. diaskus** Ensinkladur en araez da zelankañ darvoudoù hollek grevus gant hiniennoù darwalladek (trec'hwezh, ustead kalon, koempad, h.a.) nad int ket a-geñver gant natur an danvezenn sanket, met gant ar stad dibarek m'emañ ar gouziviad dre benn un ensinklad eraozus graet dezhañ diagent; darvoudoù oc'h erzerc'haat ur c'henniñv taer etre an antigen adebarzhet er bevedeg hag an antikorfoù dierc'heiat spesadel paret ennañ a-c'houde ar c'heraez kentañ gant an antigen (sl. *anaphylaxie*, *choc anaphylactique*, *injection préparante*).

injection préparante ◇ **preparatory injection** ◇ **ensinklad eraozus** Ensinkladur un danvezenn o tec'han stad an darwalladezh er gouziviad; lavarout a reer ez a hemañ darwalladek (sl. *injection déchaînante*).

inject-

• *après injection d'un opacifiant* goude sankañ un demeraer • *injection d'immunsérum* sankadenn wadvez hangaek • *injection des conjonctives* darwazh ar c'hevresaeoù • *injection rapide d'un produit de contraste* ensinkladenn herrek un aozad dargemm.

innéité ◇ **innateness** ◇ **enganeted** b. 1 (Ster klasel, a-gevenep da *hêrelezh*) doare an tuedoù piaoel d'an hinienn amparet a-zegouezh da geñver an engehentañ pe e-kerz ar vec'hiegi. 2 Hiziv e tenner d'ober eus *enganet* (Gl. *inné*) ur c'henster da *ganedigal* (Gl. *congég-nital*), eleze doare an tuedoù bezant d'ar c'hanedigezh, ken a-hêrezh, ken azegouezh (sl. *acquis*, *congénital*).

innervation ◇ **innervation** ◇ **nervaouiñ**, **nervouadur** g. Dasparzh an nervennoù e-barzh un organ pe ur rannbarzh eus ar bevedeg, sk. : *nervouet emañ an dorn gant barroù eus an nervennoù a-helmo hag awerzhid*.

NOTENN : Dav eo menegiñ an termen Al. *Innervation* (Br. *ennervadur*) bet arveret gant Freud en e labourioù kentañ evit arouezhiñ amdroadur ar "gremm bred" e "gremm nerverl" hag an dehtadur anezhañ etrezek al lodenn-mañ lodenn eus ar c'horf.

innocuité ◇ **harmlessness** ◇ **anargevez** g. Perzh bezañ hep dañjer (sl. *nocuité*).

inocclusion palpébrale ◇ **palpebral inocclusion** ◇ **ankeharz g. ar malvennoù** Dic'hallusted kleñvedel da glozañ ur valvenn grec'h (sl. *Bell : signe de ~*).

inoculation ◇ **inoculation** ◇ **enkorriñ**, **enkoradur** g. Ebarzhiñ ur gwezher poreüs en ur metoù bev (bevedeg, vi yar rizhellek), tiñvadenn gelligoù), pe en ur metoù anvev (en dro-mañ e komzer kentoc'h a *hadennañ*, Gl. *ensemencement*).

inoculum ◇ **inoculum** ◇ **enkorenn** b. Termen arveret er c'harvevoniezh da arouezhiñ ar c'hementad hadennoù ebarzhet en ur metoù tiñvañ pe enkoret ouzh ul loen imbourc'hva.

inondation trachéale ◇ **tracheal inundation** ◇ **liñvadenn b. vriantel** Ruradenn ur c'hementad bras liñvenn er vriant (forzh pe orin e ve dezhi).

inondation ventriculaire ◇ **ventricular inundation**, **intraventricular hemorrhage**, **Broadbent's apoplexy** ◇ **liñvadenn gambrel** Ruradenn wad er c'hambrou da heul pe ur gwatoñv enempennel, pe fregadur ur gammeuziad wazhiedel nes-kamb, pe erfin, gant ar rakkoulvez, fregadur gwazhiennnoù endan-epidim (e tachad eginek an derc'hvel dreist holl); dec'han a ra ur c'homa don gant dargrezadoù hag uswrez, o tedreiñ d'ar marv dindan an nebeut eurvezhioù pe un nebeut devezhioù.

inositol ◇ **inositol** ◇ **inozitol** g. Molekul korvellek eus stroll ar vitaminou B, bezant en natur e rezh nav izomer; unan anezho, ar *mezoinozitol*, paot er gwin gwenn, zo ur barenn greskiñ.

inotrope ◇ **inotropic** ◇ **1 argrezwezher** aa. **2 argrezwezher** g. **-ioù** 1 (Bevedouriezh) a-zave da argrezusted gwiennnoù ar c'haber kalon. 2 Danvezenn argrezwezher, pe muiaer d'o argrezusted : *argrezwezher* (Gl. *inotrope positif*), pe leiaer dezhi : *argrezwezher* (Gl. *inotrope négatif*) (sl. *bathmotrope*, *chronotrope*, *dromotrope*).

insalubres : syndrome des bâtiments ~, **maladie des climatiseurs** ◇ **sick building syndrome** ◇ **anaez an hinaozerioù**, **azoniad an adeiladoù diyec'hedus** Rumm anaезioù o reuziañ e-barzh an tiadurioù ma tanzeer an aergelc'h : 1 Azoniad stadet er pezhioù ma vez reolet ar gwrezverk hag ar glebor, anezhañ sec'hded glaourgennoù ar gornsaе, ar fri hag ar genoù, klopennadoù (*azoniad an adeiladoù diyec'hedus* ent strizh). 2 Seurtad *skeventad hangaел* (Gl. *pneumopathie immunologique*) o tizhout an dud boas da enanalañ an uloc'h taolet en aergelc'h ar stavelloù hinaozet ma labouront. 3 *Poreoù* e dianlen an hadennoù strewet gant an afrennerioù, evel *kleñved al legionerion* (sl. *maladie des légionnaires*).

Insectes ◇ **Insecta** ◇ **Amprevaned** l. (g.) Kevrennad *Artropod* a c'hoarvez o c'horf a deir hanrann : ar penn, ar bruska, ar c'hof, en o zouez teir urzhad e deur ar vezekniezh : an *Hemipter* (louezaeed, laou), an *Dipter* (kelien, moustiked), ar *Sifonapter* (c'hwen) (sl. *cadavres : faune des ~, désinsectisation*).

insecticide ◇ **insecticide** ◇ **1 amprevanlazh** aa. **2 amprevanlazer** g. **-ioù** 1 En araez da lazhañ an amprevaned. 2 Danvezenn amprevanlazh; renket e vez an amprevanlazerioù e stroll an *astuzlazerioù* (Gl. *pesticides*), hag ar re-mañ e stroll ar *bevlazerioù* (Gl. *biocides*) (Reolennadur europat a 'r 5 Ebrl 2011).

insectifuge ◇ **insectifuge** ◇ **ampreanourzher** g. -ioù Danvezenn a euvrer, a lifrer ar c'hroc'hen pe a intrer an dilhad ganti evit argas an ampreaned hep o lazhañ.

insémination artificielle ◇ **artificial insemination** ◇ **ensperiañ kalvezadel** Mod prederiañ an anfruezhusted, anezhañ dodiñ sper (fresk pe bet miret dre skornañ) e par gouzoug ar grozh pe e-barzh ar gavenn anezhi.

insér-, insert-

• *aire d'insertion du placenta dans l'utérus* gorreenn enleñañ an dorzhienn ouzh ar grozh • *certaines endoprothèses sont insérées par cathétérisme* enosodoù 'zo a enzezer dre gateteriñ • *conduits membraneux s'insérant au pourtour des papilles rénales* kanolioù lienennek enlenet ouzh tro ar begennoù lounezh • *désinsérer un muscle, c'est l'arracher de son insertion* dizenleñañ ur gigenn eo he digrakañ diouzh he lec'h enleñañ • *désinsertion sociale* digenemprañ kevredigezhel • *l'enthèse est le lieu où se trouve inséré un muscle, un tendon, etc.* an enlenva eo al lec'h m'emañ enlenet ur gigenn, ur stirenn, h.a. • *l'insertion du tendon d'Achille* enlenad stirenn ar seul • *lieu d'insertion d'un tendon* lec'h enleñañ ur stirenn • *manchon fibreux inséré au pourtour des surfaces articulaires* gronnenn stirek enlenet ouzh ardroioù an talbennoù kenvellañ • *une petite circonférence insérée sur les apophyses clinoides antérieures* ur warenn vihan enlenet ouzh ar balegoù gweleek araok.

insidieux/s-

• *évoluant lentement et insidieusement* o tedeñ gorrek ha manguñ • *forme de schizophrénie caractérisée par un début insidieux et progressif* furm a 'r skizofreniezh naouus dre un deroù manguñ hag argammedek • *le début de l'intoxi-cation est insidieux, marqué par des troubles digestifs* manguñ eo deroù ar pistriadur, azonet gant strafuilhoù koazhadel • *maladie inflammatoire du foie dont le début est souvent insidieux* poread an avu manguñ alies en e zeroù.

insorption ◇ **insorption** ◇ **ensugañ** Enteñ er gwad un danvezenn bet suget, da skouer, gant glaourgenn ar pervez (sl. *absorption, exsorption*).

inspection ◇ **inspection** ◇ **ensellout** Ent klasel, lankad kentañ an erc'hwiliañ korf a 'r gouziviad war glask ezreolderioù a-fet furm, liv, fiñvoù, h.a. er parzh-mañ parzh anezhañ (sl. *auscultation, clinique : examen ~, palpation, percussion*).

inspiration ◇ **inspiration** ◇ **enanalañ** Lankad kentañ an analañ, anezhañ degas an aer e-barzh ar skevent.

inspir-

• *capacité inspiratoire* barr enanalañ • *inspiration forcée* enanalad helc'het • *inspiration maximale* enanalad uc'hek • *inspiration normale* enanalad reol • *spasme inspiratoire prolongé et ininterrompu* andag enanalañ hirbad ha diastal • *volume de réserve inspiratoire* ec'honad mir enanalañ.

instabilité chromosomique : syndromes d'~ ◇ **chromosomal instability** ◇ **azoniadoù distabiled b. kromozomel** Azon-iadoù naouus dre ar vezañs e kelligoù ur bevedeg eus un niver bras a ezreolderioù daskenrizh, stadet e lies kleñved hilel (azoniad Bloom, azoniad Louis Bar, amwad Franconi, *xeroderma pigmentosum*, h.a.); kevredet e vez an *d. k.* gant ur riskl uhel a zedreñ d'an hanwe.

instabilité psychomotrice ◇ **restlessness** ◇ **ankevrested b.** Diaested pe dic'halloud da chom peoc'h, da zerc'hel pell amzer gant un emzalc'h, un ober pe ur paouez, da gas da benn ur boelladenn; gant ar bugel, ez erzerc'h dre an diampartiz, ar brezikerezh, an amvarregezh skolel.

installation ◇ ◇ **raokadur** g., **raokvezh** g. Prantad deroù ur c'hleñved etre ampoent anadiñ an azonoù betek an ampoent ma 'z int en o c'hreñvañ (sl. *acmé, décours*).

install-

• *adaptation de la fibre nerveuse à l'installation d'un courant progressif* azasaat an nervwienn diouzh argresk ar read tredan • *coma d'installation progressive* koma amparet a-bazennadoù • *épanchement d'installation rapide* fennad amparet buan • *installation de fortune* stignadur feuzat, feuzad • *installation destinée à donner des douches* avead amkanet da reiñ strinkadennoù • *installations et services d'un cabinet de groupe* aveadurioù ha gwazadurioù ur c'huzulva stroll.

instillation ◇ **instillation** ◇ **enberadiñ, enberadur** g. Skuilhañ ul liñvenn a-zidakenn war ur c'horreenn pe e-barzh ur gavenn.

institut médicolegal ◇ ◇ **bonsav** g. **lezennvezegel** Diazevadur amkanet a) da zarbenn korfoù an dud marvet er-maez eus o annez pe eus ur c'hurdi, b) d'ar c'helanweliñ.

institut médicopédagogique ◇ **medicoeducational institute** ◇ **bonsav diougovezegel** Diazevadur amkanet da zeskadurezh ar vrednammidi yaouank.

instrument(-)

• *instrument chirurgical en forme de pince* benveg surjianerezh e stumm ur c'hevel • *instrument contondant* klav kreuiñ pe kreuus • *instrument d'optique* ardivink optikel • *instrument tranchant* klav skejañ pe skejus • *instrumentaliser* araezelañ • *plaie, blessure par instrument piquant* gouli, gloaz dre glav gwanañ pe gwanus.

insuffisance ◇ **insufficiency, incompetence** ◇ **skorted b., divig** g., **falladur** g. Gant un organ, leiadur an araezegezh da gfeleuniañ e arc'hwel.

insuffisance aortique ◇ **aortic regurgitation or insufficiency or incompetence** ◇ **skorted pe gousilhañ aortek** Andalc'h an trapig aortek (TA *valva aortae*, PNA *valvula semilunaris senestra*) ha distro eus gwad an aortenn d'ar c'hofig kleiz hag, a-zianlen, skorted wadloc'honiell hemañ; diseurt an arbennoù : enkalonennfo remmel pe vakteriel, mideñvoù, enrec'h an aortenn dreist holl.

insuffisance artérielle ◇ **arterial insufficiency** ◇ **skorted talmerel** Heskwas en ardraoñ da isvoll pe da anforzh un dalmerenn, lemm (enfrou) pe henek (ateroskleroz), sk. : *talmerennad stevius an izili traoñ*.

insuffisance cardiaque ◇ **cardiac insufficiency, heart failure** ◇ **skorted kalon, falladur g. kalon** Dic'halloud ar galon da vastañ da ezhommoù gwadloc'honiell ar bevedeg; *kevassavet* pa vez arzalc'het an ec'hongas dre araeziou azasaat naturel pe yac'hadel, *digevassavet* pa na spir mui ar re-mañ en ur bazenn c'hrevusoc'h eus an dedro; mar bez kevredet gant un azdalc'h dourhale e reer kel eus *falladur kalon darwazhel* pe *gouliñvel* (Gl. *i. c. congestive pe œdémateuse*); *a) ent klinikel*, ez erzerc'h dre un ustead kalon hag arouezioù dassav en argrec'h : trec'hwezh strivadell, gouliñv skevent evit ar *s. k.* kleiz, gouliñvoù trobarzhel, troazhisvorc'h hag avu kalonien evit ar *s. k.* dehou; *b) ent arbennel*, evit ar *s. k.* kleiz : isvoll mintrek, uswask talmerel, naouedoù a 'n talmerennoù kuruner hag a 'n trapig aortek, skorted vintrek, naouedoù an enkalonenn, evit ar *s. k.* dehou : bronkezskeventadoù, enfeire skevent, naouedoù ganedigel 'zo a 'n enkalonenn, kalonnaouedoù kleiz digevassavet o tisoc'h neuze d'ar *s. k. bloc'hel* (Gl. *insuffisance cardiaque globale pe totale*); *c) lies gwikefre* a zeskriver : pe un isvoll mintrek pe dribroudek en argrec'h o skoilhañ ouzh leuniadur ar c'hofig, pe un tevadur a 'n amgalonenn hag ur fennad (adiastol ar c'hofig dehou, sl. *péricardite constrictive, tamponnade*), pe, aliesoc'h, ur *s. k. sistotel pe misistol* (Gl. *dys-systolie*), eleze isargrezusted ar c'hofigoù.

insuffisance chronotrope atriale ◇ **atrial chronotropic failure or incompetence** ◇ **talmangwezh g. kentezel** Dic'halloud ar c'hentez da vuanaat ent reol e dead.

insuffisance coronaire ◇ **coronary failure** ◇ **skorted kurunerel** Diouer eroueriañ ar c'haer kalon diwar leiadur kavnez an talmerennoù kuruner; ent klinikel, e reer kel eus *s. k.* pa na vez mui an amred kurunerel evit bastañ da ezhommoù kennevidell ar c'haer kalon, a-fet an oksigen pergen, ha pa stader darvoudoù kleñvedell lemm pe henek (kevenkez, aroad kalonank, angwazhiad ar c'haer kalon) (sl. *angor, état de mal angineux, infarctus du myocarde*).

insuffisance hépatique ◇ **hepatic insufficiency** ◇ **skorted avu** Falladur arc'hwelerezh an avugelligoù, erzerc'h dre arouezioù klinikel ha bevoniel, o tarvezout evel rouestlad d'an avufoioù, d'ar c'hirroziou, da gankrou an avu.

insuffisance mitrale ◇ **mitral insufficiency or incompetence** ◇ **skorted pe gousilhañ mintrek** Andalc'h an trapig mintrek (TA *valva mitralis*, PNA *valva atrioventricularis sinistra (mitralis)*) o tevoudañ an distro sistolel eus gwad ar c'hofig d'ar c'hentez kleiz hag, a-zianlen, skorted ar c'hofig kleiz; dezhañ lies arbenn ha gwikefere : *s. m.* naouedell pe arc'hwelel, ganedigel pe arzeuat (enkalonennfo remmel pe vakteriel, fregadur kigennoù begennek pe kerdad stirennnek, bolzennad, dreistpad ar san voutin kenteziou-kofigoù) (sl. *ballonnement de la valvule mitrale, canal auriculoventriculaire : persistance du ~ commun, endocardite*).

1 insuffisance pulmonaire 2 insuffisance pulmonaire ou respiratoire ◇ **1 pulmonary (valve) insufficiency, pulmonary regurgitation 2 pulmonary insufficiency, respiratory failure** ◇ **1 skorted pe gousilhañ skeventel 2 skorted pe falladur skevent, falladur analadel** 1 Andalc'h an trapig skeventel (TA *valva trunci pulmonalis*, PNA *valvula semilunaris dextra*) ha distro eus gwad an aortenn d'ar c'hofig kleiz hag, azianlen, skorted wadloc'honiell hemañ; diseurt an arbennoù : enkalonennfo remmel pe vakteriel, mideñvoù, enrec'h an aortenn dreist holl. 2 Dic'halloud ar benvegad analadel da arzerc'hel gwaskoù reol an O₂ hag ar CO₂ er gwad talmerel, e dianlen *a) iswentadur ar skevent* (Gl. *hypoventilation pulmonaire*), hemañ o vezañ pe *isaraezel* (Gl. *restrictive*) da heul leiadur ec'honad ar skevent (ambid ur skeventenn, glenad ar c'hrezoù), pe *steviadel* (Gl. *obstructive*) diwar ur skoill ouzh an enanalañ ha dreist holl ouzh an ec'hanelañ (bronkezfz henek stevius, astma, emfizem), *b) daralladurioù kennenn al logigoù* pe *speur ar c'horrwazhied* o tiaesaat an eskemmoù etre an aer hag ar gwad.

insuffisance rénale aiguë ◇ **acute renal failure** ◇ **skorted lounezh lemm** Falladur lemm arc'hwelioù al lounezh, naous dre un an-pe un isec'hod troazh, e dianlen *a) ur skoill ouzh an degorzhañ* (*gaouantroazh* pe *s. l. l. goudelounezhel*), *b) ur strafuilh gwadloc'honiell o tec'h an heskwad al lounezh* (*antroazh dre goempad* pe *s. l. l. rakkounezhel*), *c) un anaf e parenkim al lounezh* (*antroazh pistriell, antroazh diwar vloueigfo lemm*); gwellaet eo bet an erbedad bennoz d'ar c'harzhañ ezlounezhel; notañ a reer ivez ar vezañ eus *skortedoù lounezh lemm gant dezioulañ* (troazh puilh hag anvec'hiek) (sl. *anurie, anurie excrétoire, Bywaters : syndrome de ~, épuration extrarénale, néphropathie tubulo-interstitielle aiguë, rein de choc*).

insuffisance rénale chronique ◇ **chronic renal failure** ◇ **skorted lounezh henek** Falladur henek arc'hwelioù al lounezh, e dianlen un niver lounezhadoù ganedigel pe arzeuat (bloueigel, tuellennel pe entremezel), naous dre muiadur argammedek kreatinin ar plasma ha strafuilhoù dourkevionel; er pleustr, e teznaouer ar *s. l. h.* pa ziskenn dizeul ar c'hreatinin dindan 90 mL/min dre 1,73 m² gorread korf; *pazenn dibenn ar s. l. h.*, pa dremen an dizeul dindan 10 mL/min dre 1,73 m², a redi d'ar c'harzhañ ezlounezhel war hir dermen hag, en degoezhioù grevusañ, d'an treuzplantadur lounezh.

insuffisance surrénale ◇ **hypoadrenalism, adrenal insufficiency** ◇ **skorted kaenuslounezhel** Leiadur pe astal borc'hañ hormonou ar gaenuslounezhenn, e dianlen un anaf kentaell hogos bepred, oc'h angorzhañ en ur ser ar glukokortikoidoù, an aldosteron hag an androgeneier; lemm an dedro a-wechoù (da skouer da geñver ur wadlestegzh : marvennad gwadliñvus, koempad trumm, दौरisvec'h, coma ha marv dindan un nebeut eurvezhioù), henek peurliesañ (kleñved Addison) (sl. *Addison : maladie d'~, Waterhouse-Friderichsen : syndrome de ~*).

insuffisance tricuspide ◇ **tricuspid regurgitation or insufficiency** ◇ **skorted pe gousilhañ tribroudek** Andalc'h an trapig tribroudek (TA ha PNA *valva atrioventricularis dextra (tricuspidalis)*) o tevoudañ an distro sistolel eus gwad ar c'hofig d'ar c'hentez dehou hag, a-zianlen, skorted ar c'hofig dehou, dezhañ lies arbenn ganedigel pe arzeuat (kalonnaouedoù dehou, enkalonennfo bakteriel, h.a.).

insuffisance valvulaire ◇ **valvular insufficiency** ◇ **skorted sac'hellel** 1 Divig kevarloañ ar sac'helloù a ya d'ober un trapig kalon, o tevoudañ ur gousilhañ, eleze distro ar gwad d'ar gavenn emañ o paouez kuitaat (sl. *insuffisance aortique, i. mitrale, i. pulmonaire, i. tricuspide*). 2 Divig kevarloañ sac'helloù ar gwazhiennou.

NOTENN : Kemmesk a chom en termenou gallek e kement ma ne gempleg ket lod eus an aozerion d'an destladur etrevroadel, pa reont Gl. *valvule* eus an *trapig* (TA *valva*), ha Gl. *valve* eus ar *sac'hell* (TA *valvula*), div pe deir *sac'hell* oc'h amparañ an *trapig*, lavnennoù o tijañ da lezel ar gwad da vont hag o kenjuntañ da virout outañ a zistreiñ.

insuffisance vertébrobasilaire ◇ **basilar insufficiency** ◇ **skorted melkeindiazpenn** Divig an amred e tiriad an talmerennoù mellkein hag an dalmerenn diazpenn, hogos bepred e dianlen anafoù ateromatus isvullus ha trombozus, erzerc'h dre zireizhoù delantek gant ar strivadoù hag ar c'hemmoù loadur, o testiñ gouzañvder heskwadel ar gwriad nerval : kilpennost, koll kempouez, strafuilhoù gweledel (steuzwel, merzhadur pikoù ha linennoù luc'hus) pe loc'hadel (eskerbad an divesker), skouladoù morvor pe ankoun, a-wechoù strafuilhoù klevedel, ilpennel, santadel, migevaot, h.a. ; liesmod eo an dedreiñ, o vont da henek a-wechoù dre skorted trebadek an amred pe dre an tromboz gant boukadur (sl. *Kleyne : manœuvre de —, ramollissement vertébrobasilaire, sous-clavière voleuse : syndrome de la ~*).

insuffis-

• *insuffisamment développé, atrophié* skoanet • *insuffisamment vacciné* amvaksinet • *insuffisance artérielle* skorted talmerel • *insuffisance circulatoire aiguë* divig lemm amred ar gwad • *insuffisance corticosurrénale* kaenisvorc'h • *insuffisance droite* skorted dehou • *insuffisance endocrinienne* skorted enborc'hadel • *insuffisance génitale* skorted c'hanadel • *insuffisance momentanée du débit coronaire* skorted ampoentat ar c'has kurunerel • *insuffisance respiratoire* skorted analadel • *insuffisance testiculaire* skorted klidennel • *l'insuffisance des contractions du myocarde* anefedusted argrezadoù ar c'haber kalon • *un nombre insuffisant* un niver diouerek.

insufflation ◇ **insufflation** ◇ **enc'hwezhañ** Ensinklañ en ur gavenn, un aezhenn pe korfoù sonnel pe liñvel difrout.

insula : lobe de l'~ ◇ **lobus insularis** (TA) ◇ **enezenn b.** Lodenn eus pluskenn an empenn loet e deun an *nant kostezel* (PNA & TA *sulcus lateralis*, Gl. *scissure de Sylvius* pe *sillon latéral*).

insulaire ◇ **insular** ◇ **1 ~enezenn 2 ~enezigoù** 1 A-zave d'an enezenn (empenn). 2 A-zave da enezigoù Langerhans (ilgreiz).

insuline ◇ **insulin** ◇ **insulin g.** Hormon enepdiabet borc'h et gant kelligoù β enezigoù Langerhans, e wered isvec'hiañ glukoz ar gwad, gwezhusaat danvezidigezh ar glukoz gant ar gwiadoù dre vuanaat an tremen anezhañ a-dreuz koc'henn ar gellig; enaozet gant kelligoù an ilgreiz, ar *proinsulin*, 86 amindrenkenn ouzh e ober, a vez skejet e div rann, an *insulin*, ennañ 51 amindrenkenn dasparzh etre daou zigorvell A ha B, hag ar peptid C, ennañ 31 amindrenkenn; insulin ha peptid C a dremen er gwad ha dispennet e vezont, hemañ el lounezh, hennezh en avu; emañ gwadvec'h reol an insulin etre 6 hag 26 μL/mL (pe etre 43 ha 187 pmol/l); er yac'hadurezh ez arverer insulinou a orin denel *unanenaozel* (Gl. *naturelle*), *allenaozel* (Gl. *hémisynthétique*), oberiet dre amsvañ un amindrenkenn en insulin ar moc'h, pe *bevenaazol* (Gl. *biosynthétique*), dewerc'h et dre hilouriezh diwar-bouez *Escherichia coli* pe *Saccharomyces cerevisiae*; el liaerezh, dre azdodiñ molekul diseurt d'an insulin e tanzeer *insulinou arzilerc'h* (Gl. *insulin protamin-zink*); erfin, kevanaozet e vez enepdiabeteier kevelerioù an insulin (*humalog, glargin*, h.a.).

insulinémie ◇ **insulinaemia** ◇ **gwadvec'h g. insulin, insulinwadvec'h g.** Feur insulin er gwad.

insulinodépendant ◇ **insulindependant** ◇ **insulinrankus aa.** A-zivout un diabet na c'haller diren nemet dre ziounit insulin.

insulinome, insulinoblastome ◇ **insulinoma** ◇ **insulinom g.** Yoc'henn guñv (adenom langerhansel) pe yud (epiteliom langerhansel) enezigoù Langerhans an ilgreiz; reoù a c'hoarvez a gelligoù β borc'her insulin hag a zevoud gwadvec'h glukoz.

insulinoprive ◇ **insulinopenic** ◇ **olinsulinel aa.** A-zave d'un diouer insulin.

insulinorequérant ◇ **requiring insulin, insulin applicant** ◇ **insulinrekizus aa.** A-zivout un diabet nad eo ket insulinrankus, a ranker koulskoude mezegañ dre an insulin da geñver un darvoud daskerzhat (ur poread da skouer).

insulinorésistance ◇ **insulin-resistance** ◇ **insulinharzusted b.** Amaraezusted an insulin da reoliñ tremen ar glukoz er gwiadoù ha paridigezh ar glukoz gant an avu, ha pa ve anezhañ un *insulin endeuat* pe un *insulin ezdeuat* ensinklet d'ar c'houziadiet insulinrankus; *darnel* pe *holl* e vez, *padennek*, a-geñver gant un anaez daskerzhat, pe *trebadek*, dre benn falladur ar buzerioù; alies e vez devoudet gant dispenn an insulin el lec'h m'en ensinkler pe dre berzh ar vezañs eus antikorfoù antiinsulin.

insulinosécrétion : coefficient d'~ ◇ ◇ **argement g. insulinvorc'hañ** Keñver etre gwadvec'h an insulin ha gwadvec'h ar glukoz (ent reol, par da 2).

insulinothérapie ◇ **insulinization** ◇ **insulingurañ** Ensinklañ insulin evit prederiañ an diabet; da ziforc'hiañ diouzh *hentenn Sakel* (Gl. *méthode de Sakel*), prederiadur bredvezegel dilezet hiziv, anezhañ dec'han ur c'homa glukozwadvec'hel, ar *bleuz insulinel* (Gl. *choc insulini-que*), dre ensinklañ un doan uhel insulin.

insulite ◇ **insulitis** ◇ **enezigfo g.** Tanijern enezigoù Langerhans stadet e deroù an diabet a rizh I.

intégrine ◇ **integrin** ◇ **integrin g.** Rumm buzerioù kennennel dezho luniad un heterodimer, ouzh o ober daou zigorvell polipeptidek α ha β; warno e wered proteinoù (fibronectin, trombospondin, h.a.); dasperzhiañ a reont e glenerezh ar c'helligoù, ar pladanoù hag al limfokit pergen.

intégr-

• *auditivité d'intégration* klevmuderezh enluzañ • *désintégration phonétique* difloskiñ soniadell • *dose absorbée intégrale* doanad luget bloc'hel • *équivalent à 3,7.10¹⁰ désintégrations par seconde* kevatal da 3,7.10¹⁰ digevanad dre eilenn • *hémiplegie caractérisée par une intégrité de la face* ledseizi naouus dre vonanded an dremm • *le césium 137 se désintègre avec émission d'un rayonnement β⁻* digevanañ a ra ar c'heziom 137 en ur leuskel ur skinañ β⁻ • *prendre la forme de prophages pour s'intégrer* aux

chromosomes bactériens kemer stumm ar profag evit gougevaniñ ouzh kromozom ar bakteri • *variété de plasmide parfois intégrée aux chromosomes* seurtad plasmid gougevan a-wechoù ouzh ar c'hromozomou.

intens-

• *affaiblissement de l'intensité d'un rayonnement* leiaat read ur skinadur • *compréhension, intensité* ental • *coloration jaune plus ou moins intense de la peau et des muqueuses* livrezh melen doues pe douesoc'h a `r c'hroc'hen hag a `r glauourgennoù • *d'intensité et d'extensité* a-ental hag a-erdal • *douleur intense* laur garv • *douleurs osseuses très intenses* laurioù eskern grizias • *effort intense et prolongé* strivad start ha hirbad • *entraînement sportif intense et prolongé* gourdonerezh sportel rennek ha hirbad • *éruption intense* dispuilhad paoterek • *fièvre intense* terzhien c'harv • *grandeur intensive* braster andennadel • *intensité de champ* nerzhder tolzel • *intensité de l'expression génique* kreñvder an erzerc'haat genennel • *intensité lumineuse* luc'hskinread, luc'hread • *intensité physiologique d'un son* kreñvder bevedel ur sten, klevrez • *intensité physique d'un son* kreñvder fizikel ur sten, stenread, tregern • *intensité sonore* kreñvder ur sten • *l'intensité d'un son est son intensité relative dans la chaîne parlée* read ur son eo e greñvder keñverel e steuñvenn ar prezeg • *processus fibreux d'intensité variable* argerzh stirekaat doues pe douesoc'h • *radiothérapie intensive* skingurañ a-greñv • *son intense* sten kreñv • *traitement antibiotique intensif* bevastalgorañ paoterek • *troubles digestifs intenses* strafuilhoù koazhadel garv.

intention ◇ **intention** ◇ **kennennad** g. Gwezh sachañ war vrielloù ur goulvi evit o c'hennesaat, sk. : *kleizennañ dre gendennad kentañ* (sl. *cicatrization*).

intercalant : **agent** ~ ◇ **intercalating agent** ◇ **gwezher** g. -ioù **dazetreañ, dazetreer** g. -ioù Danvezenn dezhi ur gwered mitozastaliñ dre loañ etre div widenn an DNA hag, e se, tolc'hañ an treuzskriavañ en RNA (sl. *antimitotique*).

intercurrent ◇ **intercurrent** ◇ **daskerzhat** aa. A-zivout ur rouestlad pe ur c'hleñved o tarvezout e kerzh ur c'hleñved all.

interférence ◇ **interference** ◇ **daremouezh** (bn. : **daremoug-**), **daremoug** g. 1 (Kalonouriezh) erwezh o tarvezout pa vez ur wagenn vliavaot o tираez ur parzh eus ar c'haber kalon aet anvoudennad dre berzh ur genitrenn loc'het eus an annon bliavaot all. 2 (Viruzouriezh) skoilh ouzh neridigezh ur viruz en ur bevedeg pe en un tiñvadur dre berzh neridigezh diagent ur viruz all.

interféron, IFN ◇ **interferon, IFN** ◇ **interferon** g., **IFN** Glikoprotein bihan (tolz mol etre 15. ha 40.10³) paret prim e-barzh ar c'helligoù poreet gant ur viruz hag o skoilhañ ouzh an neridigezh anezhañ; skignañ a ra er gwiadouù kefin ha goulankañ er c'helligoù anporet borc'hidigezh ur protein all, an TIP (*translation inhibitory protein*), o vont da dolc'hañ enaoz an drenkenn nukleek er viruz ha, dre se, da herzel outañ a neriñ; piaouel eo an *i.* d'ar spesad loenel poreet ha n'eo ket d'ar viruz poreer; e-touez dec'hanerioù paridigezh an *i.* e kaver, ouzhpenn ar viruzoù, garvevion ha danvezennoù bevel naturel (endotoksinou garvevel) pe kevanaozel; en tu all d'e wered enepviruz, e c'hell an *i.* daskemmañ an erwezhiou hangaeel ha herzel ouzh ar c'helligoù reol pe hanweel a deñvañ (sarkom Kaposi, melanom yud, limfomou pergen); hervez ar c'helligoù orin e tiforc'her an *i.* a *rizh I*, daou seurtad anezhañ, α (paret gant al leukokit), β (paret gant ar fibroblast), hag an *i.* a *rizh II* pe *i.* γ, enaozet gant al limfokit T; kitokinoù eo an interferonou, nemet an interferon γ, a zo ul limfokin; an holl seurtadoù interferon a fraoua ar c'helligoù K genidik (sl. *cellules tueuses naturelles, cytokine, lymphokine*).

interleukin, IL ◇ **interleukin, IL** ◇ **interleukin** g., **IL** Rummad danvezennoù plasmatek hezileizh (kitokinoù) borc'het gant ar makrofaj ha limfokit 'zo, en araez da fraouat kelligoù all perzhiat en hangaeañ; bep bloaz e hennader seurtadoù IL nevez, a renker hervez o gweredoù pe hervez ar c'helligoù borc'her anezho, da skouer an *IL1*, paret gant ar makrofaj, o werediñ war al limfokit T.

intermenstruel ◇ **intermenstrual** ◇ **etremiziaouel** aa. O tarvezout etre ar mizioù (sl. *quatorzième jour : syndrome du* ~).

intermittence ◇ **intermission** ◇ **1 spanaenn** b. **2 spanaouegezh** b. 1 Padenn etre daou varr eus un derzhienn pe eus ur c'hleñved bennak (sl. *cyclothymie, fièvre intermittente, paludisme*). 2 Strafuilh en ur gorvez, anezhañ paouezioù (*spanoù*, Gl. *interruptions, blocages*) o tarvezout ent vareadek pe get etre kemalennou reoliek, termen arveret da arouezñ migorveziou 'zo a `r galon; diforc'hiñ a reer *a*) ar *wir s.*, astalioù hir pe hiroc'h en argrezadoù ar c'hofig diwar un tolc'had kentez-kofig, dibaotoc'h diwar un tolc'had god-kentez, *b*) ar *vanspanaouegezh*, argrezadoù ar c'hofig o vevañ re wan evit azlammat er poulz (sl. *extrasystole*).

internalisation ◇ **internalization** ◇ **enteñ, entoidigezh** b. Ebarzhiñ un danvezenn gimiek en ur gellig.

interne, résident ◇ **resident** ◇ **diabarzhad** g. -ed, **trigad** g. -ed E Frañs, studier war ar Vezekniezh oc'h embreger dindan atebeghez ur penn gwazrann.

interne : **médecine** ~ ◇ **internal medicine** ◇ **Mezekniezh** b. **diabarzh** Ent klasel, rann eus ar Vezekniezh o plediñ gant ar c'hleñvedoù ansurjanel; hiziv, Mezekniezh kuzuliañ, loet er c'hroazhent etre ar Vezekniezh hollek hag an arbennigiezhou.

internement ◇ **confinement** ◇ **1 endredañ** **2 argaezhañ** 1 A-zivout bredklañvourion 'zo, klañvdiañ dre redi. 2 Bac'hañ dre zivivad barnerezhel pe politikel.

NOTENN : Abaoe 1990, e Frañs, ez eo bet dilezet an termen *internement* hag erlec'hiet outañ *hospitalisation, placement*; tri seurt endredañ ez eus hiziv : 1) ar c'*hlañvdiañ dieub* (Gl. *hospitalisation libre*), ar gouziviad o c'houlenn e unan bezañ herberc'hiet en ur wazrann vredevezegel, 2) ar c'*hlañvdiañ* pe *endredañ diwar goulenn un trede* (Gl. *hospitalisation pe placement à la demande d'un tiers*), da heul testeni ur mezeg, 3) ar c'*hlañvdiañ* pe *endredañ a-berzh kefridi* (Gl. *hospitalisation pe placement d'office*), dre un diferad douget gant ar prefed diwar un testeni savet gant ur bredvezeg.

interniste ◇ **internist** ◇ **diabarzhour** g. -ion Embregour ar Vezekniezh diabarzh.

intérocepteur ◇ **interoceptor** ◇ **endonfraouaer g. -ioù** Dibenn navel o tastum ar broudadoù o c'hoarvezout e diabarzh ar c'horf (*endonfraouadoù*, Gl. *stimulations intéroceptives*), eleze er c'higennoù hag er c'henvelloù (*anunfraouadoù*, Gl. *stimulations proprioceptives*) pe ebarzh ar flugez (*flugezfraouadoù*, Gl. *stimulations viscéroceptives*).

NOTENN : An diaester evit merat ar Vevdouriezh, en domani-mañ pergen, eo an amoug a rekiz ar sell ergorel digant roadennoù dangorel, alese an daouadoù termenoù o taveiñ d'an un devoud, evel Br. *santout* (*nervenn santout*), dezhañ ur c'hemeradur ergorel rik, ha Br. *eraeziñ* (*eraeziñ gweledel*), keal bevedourel a-c'haoliad war ergor ha dangor (hiroc'h a lennor war La-09 52-61, 275-285).

intersexualité ◇ **intersexuality, intersex** ◇ **eterevegezh b.** Anvad rumm an degouezhioù ma stader ar vezañs eus arouezioù eus an div rev gant un hinienn, adalek ar c'hamneuziadoù revel evel an *urevegezh* betek an daskemmoù skañv an eilarouezioù revel, evel arvezioù benevel ar baotred d'ar gaezouegezh hag arvezioù gourevel ar merc'hed d'an oad eizik (sl. *climàtere, hermaphrodisme, puberté*).

1 2 intersexué 3 intersexuel ◇ **intersexual** ◇ **1 eterevek aa. 2 etereveg g. -eion 3 eterevel aa.** 1 O tougen arouezioù revel eus an div rev. 2 Hinienn eterevek. 3 A-zave d'an eterevegezh.

interstitiel ◇ **interstitial** ◇ **entremezel aa.** A-zivout ar gwiaed gouskor (ar gwiaed kenglenel hag ar gwazhied) o c'hronnañ gwiaed arc'hwelel (elfenn hael, Gl. *élément noble*) un organ.

intertrigo ◇ **intertrigo** ◇ **intertrigo g.** Anvad rumm kroc'henfioù poreel ar plegoù kevaraezet gant ar borrdre hag ar c'hweziñ

1 intervalle libre 2 intervalle lucide ou libre ◇ **1 symptom free interval 2 lucid interval** ◇ **entremez g. mut, mutvezh g.** 1 Padvezh etre an ampoent ma tarvez un anadenn hag ar pred ma erzerc'h ent klinikel, sk. : *mutvezh en trelloezadoù pervez* pe *mutvezh treitour* (Gl. *intervalle libre dans les perforations intestinales pe accalmie traîtresse*). 2 Padvezh etre deroù ur fennad gwad enklopennel hag ar strafuilhoù navel kentañ diwar amwask an empenn pe hegad ar pilhon, un nebeut eurvezhioù goude an daraez klopenn pa vez fennadoù war-dev ha betek devezhioù goude pa vez fennadoù is-tev (*mutvezhioù er fennadoù gwad enklopennel*, Gl. *intervalle lucide pe libre dans les épanchements sanguins intracrâniens*).

interven-

- *excrétion sans intervention tubulaire* degorzhañ hep emell an tuellennoù
- *intervenant dans les réactions immunitaires* dasperzhiat en erwezhañ hangael
- *intervention chirurgicale* gwezh pe gwezhiadenn pe oberata pe oberatadenn surjaniel
- *oligoélément intervenant dans le métabolisme des glucides* nemeurelfenn o tasperzhañ e kennevid ar glukid
- *s'abstenir d'intervenir* diarc'he-diñ.

intestin ◇ **intestine** ◇ **pervez g., TA intestinum** Lodenn a 'r ganol vezhur etre ar stomok hag ar fraezh, o c'hoarvezout eus ar *vouzellenn voan* (TA *i. tenue*), tri farzh ouzh he ober : an *daouzegenn*, ar *yunegenn*, ar *glunegenn*, hag eus ar *vouzellenn dev* pe *kolon* (TA *i. crassum* pe *colon*), c'hwec'h parzh ennañ : *sac'henn*, *kolon a-sevel*, *kolon treuz*, *kolon aziskenn*, *kolon sigma*, *youlc'h* (darn diwezhañ hemañ o vezañ *kanol ar fraezh*) (sl. *cæcum, canal anal, côlon, duodénum, iléum, jéjunum, rectum*).

intestin irritable : **syndrome de l'~, colopathie fonctionnelle** ◇ **irritable bowel syndrome** ◇ **azoniad ar pervez hegeuziek, kolonanaez g. arc'hwelel** Azoniad koazhadel henek stadet paot er broioù diorreet, anezhañ un teskad strafuilhoù ec'hanaf diseurt : poan gof, stambouc'h, darc'hoal ha goustivadur pebeilat, oc'h anadiñ en holl oadoù hag o padout bloavezhioù.

intestin(-)

- *absorption intestinale* sugañ pervezel
- *anse intestinale* kilbleg pervez
- *chyme intestinal* youstenn bervez
- *glandes intestinales* gwagrennoù ar pervez
- *d'origine intestinale* pervezien
- *infections intestinales et urinaires* poreadoù pervezel ha troazhel
- *dialyse intestinale* dializiñ pervezel
- *intestin caudal* pervez lostel
- *intestin primitif* arc'hpervez
- *juxta-intestinal* nes-pervez
- *lumière intestinale* oaled ar pervez
- *occlusion intestinale* antreizh pervez
- *perfusion intestinale* trefennañ pervezel
- *suc intestinal* sug pervez
- *troubles gastro-intestinaux* strafuilhoù kreuz-pervez
- *tube intestinal* kanol ar pervez
- *ver intestinal* preñv pervezat.

intolérance ◇ **intolerance** ◇ **angougemer g.** Erwezh a-berzh hiniennoù 'zo ouzh ur gwezher allevek na erwezh ket outañ an darn vuiañ eus an hiniennoù all ; hollek e vez an erwezhoù angougemer (terzhienn, h.a.) pe lec'hiek (linadell, ikter, lounezhfo, h.a.) ; enganet e vez an angougemer (*emaoz*) pe arzeuat (*kizidikaat*) (sl. *cœliaque* : *maladie* ~, *fructose* : *intolérance héréditaire au* ~).

intolérance au glucose ◇ **impaired glucose tolerance, IGT** ◇ **amc'hougemer ar glukoz** Gwadusvec'h glukoz argrenn, dindan 1,40 g/l (7,8 mmol/l) war yun, dindan 2 g/l (11 mmol/l) goude ar predoù, hep troazhc'hlukezegezh, o tedeñv alies d'an diabet, d'an uswask talmerel ha d'ar gwadusvec'h kolesterol.

intorsion ◇ **intorsion** ◇ **enrodañ** Fiñv ul lagad en dro d'e c'hwelalhel a-saezh o tilec'hañ lodenn grec'h e voull war-du an diabarzh (sl. *extorsion*).

intoxication ◇ **intoxication** ◇ **pistriadur g.** Anaez devoudet gant gwered ur pistri war ar bevedeg ; arbenn ar *p. endeuat* (Gl. *i. endogène*), *unanbistriadur* (Gl. *auto-intoxication*) pe *toksikoz* (Gl. *toxicoze*) e vez danvezzennoù paret e-barzh ar bevedeg pe gant hadennoù bev, pe gant ar bevedeg e unan (dilerc'hiadoù a 'r c'hennevid) ; en orin ar *pistriadur ezdeuat* (Gl. *i. exogène*) e vez pistrion paret er-maez eus ar bevedeg ; *p. dianat* (Gl. *i. inapparente*) a reer eus ar pistriadurioù o chom pell amzer diazon (*plomegezh, benzenegezh*).

intracapsulaire ◇ **intracapsular** ◇ **enpouc'hadel aa.** Loet e-barzh pouc'had ur c'henvell, an avu, ar felc'h, h.a., sk. : *korf estren e.* (Gl. *corps étranger i.*, *gwatoñv i. ar felc'h* (Gl. *hémotome i. de la rate*).

intradermique ◇ **intradermal** ◇ **endermel** aa. E-barzh ec'honenn an derm, sk. : *ensinklañ endermel* (Gl. *injection intradermique*).

intradermoréaction ◇ **intradermoreaction**, **intradermal test** ◇ **erwezh g.** **endermel**, **endermerwezh g.**, **prouad g.** **endermel** Erwezh foel o tarvezout el lec'h eus ar c'hroc'hen ma voe ensinklet en derm ur boc'hed eus un danvezenn o werediñ evel un antigen (toksin, h.a.) gant hiniennou 'zo; graet da gentañ penn gant an *tuberkulin* hag al *luetin*, e talvez e ar prouad da zinoiñ tizhadoù gant an dorzhellegezh pe ar sifiliz; arveret e vez hiziv evit andalañ derez hangae ar c'houziadiad ouzh un niver toksinoù (difterek, tetanek, strepokokel h.a.) hag ouzh allergenoù diseurt kiriek da gleñvedoù 'zo (astma, h.a.).

intrait ◇ ◇ **dezhennad g.** Angevezh apotikel hueek dewerc'het dre stabilaat diwar-bouez burezh alkool hag ec'haezhañ ur blantenn fresk war-benn gwarediñ he gwezhuzennoù.

intramural ◇ **intramural** ◇ **enspeuriat** aa. Loet, gwezhiet en ec'honenn ur spur (talmerenn, bronkezenn, kalon).

intramusculaire ◇ **intramuscular** ◇ **enkaherel** aa. Loet, gwezhiet en ec'honenn ur gigenn, sk. : *ensinklad enkaherel* (Gl. *injection intramusculaire*).

intrarachidien, **intravertébral** ◇ **intraspinal**, **intrarachidian**, **intravertébral** ◇ **enlivennel** aa. Loet, gwezhiet e-barzh kanol ar mellkein.

intrasacculaire, **endosacculaire** ◇ **within a saccus** ◇ **1 ensac'hel** aa., **ebarzh-sac'h 2 ensac'hanel** aa. 1 Loet e-barzh ur sac'h (darvollel, h.a.). 2 Loet e-barzh ur sac'han, da skouer e-barzh sac'hanoù (Gl. *sacule*) kibvanek benvegad Golgi.

intrascléral ◇ **intrascleral** ◇ **enlersaeel** aa. Loet e-barzh al lersae.

intrasellaire ◇ **intrasellar** ◇ **endibrel** aa., **ebarzh-dibr** Loet e-barzh an dibr turkek.

intra-thécal ◇ **intra-thecal** ◇ **entoagel** aa. Loet e-barzh ur c'holoenn pe un toag, termen arveret peurliesañ diwar-benn an ensinklad er gavenn endangevnick.

intravasculaire ◇ **intravasculaire** ◇ **engwazhiedel** aa. Loet pe gwezhiet e-barzh ur wazhiedenn, un dalmerenn (*entalmerennel*, Gl. *intra-artériel*), pe ur wazhienn (*engwazhiennel*, Gl. *intraveineux*).

intraventriculaire ◇ **intraventricular** ◇ **1 enkambrel** aa. **2 enkofigel** aa. Loet pe gwezhiet 1 e-barzh kambrou an empenn. 2 e-barzh kofigoù ar galon.

intra-

• *adhérences intra-articulaires* glenelloù enarzel • *administrer par voie intraveineuse* pe *veineuse* diouint dre ar wazhienn pe ent wazhiennel pe ent engwazhiennel • *canal intralobulaire* kanol enflipezenn • *canalicule intracytoplasmique* kanolig enkito-plasmel • *hypertension intracrânienne* uswask enklouennel • *pneumonectomie intrapéricardique* skeventezvenañ ebarzh-amgalonenn • *pneumothorax intrapleural* bruskaezhad etre-krezoù • *pression intraoculaire* gwask enlagadel • *refouler les organes intra-abdominaux* disvountañ organoù diabarzh ar c'hof • *stimulateur électrique intracorporel* tredanfrouer enkorfel • *thèques intra-épithéliales* toagoù enepitelel • *tumeur intrasellaire* yoc'henn endibrel pe ebarzh-dibr • *zone trans-parente intraosseuse* tachad sklaer ebarzh-askorn.

intriqu-

• *angor intriqué* kevenkez kemmesk • *dont le prolongement s'intrique avec les autres éléments du tissu nerveux* etrefuilhet he astenn gant elfennoù all an nervviad.

introduit ◇ **introduced** ◇ **broelet** A-zivout ur pore dastumet er vroezenn m'emeur o chom, hag eñ degaset avat gant gouziviaded bet tredizhet en ur vroezenn all.

introjection ◇ **introjection** ◇ **gougantañ** (Bredelfennerezh) keal dec'heriet gant Ferenczi : “Tra ma ezvount ar paranoiak eus e ve an tuedoù aet da zisplijus, e klask an neurozeg an diskoulm dre zegas e diabarzh e ve an darn vrasañ gwellañ eus ar bed diavaez dre ober anezhi an ergerc'henn da eriuelloù diemouez” (sl. *identi-fication, incorporation*).

introversion ◇ **introversion** ◇ **entroador** (Bredelfenn-erezh) termen luniet gant Jung da arouezañ didenn al libido diouzh an ergerc'hennoù diavaez davit bed diabarzh ar gouzrec'h, amprestet hag azveret e ster gant Freud : hervezañ e tidenn al libido dre gevannodiñ furmadurioù derc'hadel e diabarzh ar bred (sl. *extraversion*).

intubation ◇ **intubation** ◇ **enpibañ**, **enpibadur g.** Sankadur ur sont en ur ganol naturel; da geñver an dieraezñ, goude lankad an dehatiñ, enezañ ur sont e-barzh ar vriant war-benn arzerc'hel frankiz ar forzhioù analañ (sl. *induction 4*).

intumescence ◇ **intumescence** ◇ **koeñv g.**, **koeñvadur g.** Muiadur ec'honad ur parzh korf (arveret nebeut kaer eo an termen gallek).

inuline ◇ **inulin** ◇ **inulin g.** Danvezenn degorzhet gant blouegoù al lounez dre silañ eeun hep emell an tuellennoù, arveret dre se evit andalañ arc'hwel ar blouegoù.

invagination, **intussusception** ◇ **intussusception**, **invagination** ◇ **emouinañ**, **emouinadur g.** Eiltreiñ un tamm eus ar pervez dre sankañ e-barzh an tamm da heul en doare m'emañ feuriet gantañ; (a-zivout sankadur tamm pellek ur vlevenn e-barzh an tamm nezek, sl. *cheveux en bambou*).

invalide ◇ **invalid**, **disabled** ◇ **1 divarrek** aa. **2 divarreg g.** -eion 1 Leiaet e varregezh da labourat. 2 Den divarrek (sl. *invalidité*).

NOTENN : A-dal da Br. *divarreg* ne vez ket arveret ar pennanv Gl. *invalidé* en askont da gemeradur istorel ar ger (*les Invalides*) ; graet e vcz gant ar c'herienn *en invalidité*.

invalidité ◇ **1 disability 2 disablement, disability** ◇ **1 divarreghez b., nammded b. 2 divarreghez** 1 Leiadur trebadek, darnel pe hollle, a 'r c'houestad da labourat, e dianlen ur c'hleñved, un darvoud, ur gloazad brezel, a natur gefredel, askomarez, bredloc'hadel, kaherel, h.a. 2 E Frañs, saviad un diogeled a 'r C'hedskor dindan 60 vloaz, kollet gantañ, evit un darn pe en holl, e c'houestad da labourat dre benn ur c'hleñved pe un darvoud anvicherel ; pa sav angouestad an diogeled dreist 66 % e tal dezhañ ar C'hedskor ul *leve divarreghez* (Gl. *pension d'invalidité*) (sl. *inaptitude, incapacité*).

invasif ◇ **invasive** ◇ **1 aloubus aa. 2 trewan aa.** 1 A-zivout un argerzh kleñvedel (poreadur, kankr) oc'h emastenn herrek ebarzh ar bevedeg. 2 sl. *effraktif*.

invasion ◇ **invasion, invasion stage** ◇ **1 enneriñ 2 ennervezh g.** 1 Dinodiñ erzerc'hadoù kentañ ur pore. 2 Prantad ur pore etre ar gounervezh hag ar bogvezh ; dre vras ez eus anezhañ mare an dredizhusted vrasañ (sl. *acmé, contagion, incubation*).

inversion, hétérotaxie, situs inversus, transposition viscérale ◇ **inversion : visceral ~, situs inversus viscerum** ◇ **ginload g. ar flugez** Ezreolder o c'hoarvezout eus ar vezañs a-c'hindu eus un pe lies organ, sk. : *ginload ar galon* (kalon a-zehou), *ginload an avu* (avu a-gleiz), h.a.

inversion chromosomique ◇ **chromosomal inversion** ◇ **ginrannañ kromozomel** Gouskoevad o c'hoarvezout eus disrann lodenn greiz ur c'hromozom, he c'hweladur a 180° hag he adenlenadur en hevelep lec'h (sl. *aberration chromosomique*).

inversion du testicule ◇ **inversion of testicle** ◇ **ginc'hwelañ g. ar glidenn** Lakadur ezreol ar glidenn er gousac'h en doare m'emañ kempeg an argell ouzh ar ribl araok anezhi.

inversion de l'utérus ◇ **inversion of uterus** ◇ **eiltreñ g. ar grozh** Islink deun ar grozh e-barzh he c'havenn hag, a-wechoù, e-barzh kavenn ar gouin, en doare m'emañ distroet an organ evel biz ur vaneg, darvoud dibaot kenan eus ar gweleskar, devoudet a-wechoù gant ur sachadenn drumm war funig ar begel pe gant un ezwaskadenn greñv war deun ar grozh.

invertase ou **invertine** ◇ **invertase or invertine** ◇ **invertaz g. pe invertin g.** Enzim borc'het gant glaourgenn ar pervez, trelusker rannadur ar sakaroz etre glukoz ha levuloz.

investigateur ◇ **investigator** ◇ **kantimbourc'her** Mezeg a zo e gefridi ren ha sterniañ un imboure'h klinikel, eveshaat ouzh tuta ar youladed yac'h hag/pe ar c'houziadiad angorzhet gant an amodadur ha damantiñ d'o yec'hed ha d'o hevoud e-doug ar prouadoù ; atebek eo war genfurm divezel ar prouadoù ha war gantreizh skiantel komenadoù an imboure'h hag an aozadoù diounezet.

involontaire

• *une action est dite automatique quand on conçoit le système nerveux à la façon d'un système physique, et involontaire quand on l'oppose aux actes volontaires (intentionnels)* ur gwezhiad a lavarer emgefreak pa zeseller an nerved evel ur reizhiad alvezel ha diarzoug (andiarvenn) p'en ebeber ouzh an oberoù diarvenn.

involution ◇ **involution** ◇ **atreiñ, atroadur g.** Argizañ emdarzh pe gwezhiet ur gwriad, un organ, un arc'hwel pe ar bevedeg a-bezh, sk. : *atreiñ ar grozh* (Gl. *involution utérine*), distro argammedek ar grozh d'he ment kent goude ar gwilioud (sl. *dépression d'involution*).

iode ◇ **iodine** ◇ **iod g.** Elfenn gimiek eus steudad an haluzennoù (arouez **I**, niverenn atom 53), bezant er metoù naturel, en dour mor pergen ; er bevedeg, e vez kennevidet gant ar skoedenn ; arveret er yac'hadurezh diavaez evit dilestañ, ha diabarzh evit prederiañ ar skoedusvorc'hegezh ; er Skinouriezh e talvez da aozañ gwezherioù Xdemer.

iode radioactif ◇ **radioiodine** ◇ **iod skinoberiek, skiniod g.** Er Vezekniezh e reer gant seurtadoù skiniod kalvezadel : *a)* an *iod 123* (¹²³I, 13,3 h hanterhoali), ec'hoder γ 159 keV, *b)* an *iod 125* (¹²⁵I, 60 d hanterhoali), ec'hoder γ 35 keV, o daou arveret en imboure'hioù arc'hwel, *c)* an *iod 131* (¹³¹I, 8,07 d hanterhoali), ec'hoder β^- ha γ 365 keV, arveret ken evit erc'hwiliañ, ken evit prederiañ ar wagrenn skoed ; da geñver un darvoud derc'hanel hag ar riskl euveriñ skinoberiek dre an iod 131, e tiounezer d'ar boblañs en ardizh moustradoù iodidenn galiom war-benn tol'hañ entoadur an iod er skoedenn.

iode : teinture d'~, soluté alcoolique d'iodé officinal ◇ **tincture of iodine, week iodine solution** ◇ **tentur g. iod, dileizhed g. alkoolek iod liavonegel** Dilester haluzennet e-touez ar re goshañ hag efedusañ en arver bepred dileizhet da 5 % en ur meskad dour-alkool.

NOTENN : Hag eñ ankerer, e chom boaziet an termen *tentur iod* hag e gevatalioù allyezh : La. *tinctura iodi*, Al. *Jodtinktur*, It. *tintura di iodio*, h.a.

iodémie ◇ **iodaemia** ◇ **iodwadvec'h g.** Feur an iod er gwad, ent reol etre 4 hag 8 μ g dre 100 mL plasma, a elfenner etre *iod meinel* pe *iod anvevel* (1 μ g %) ha *iod bevel ereet ouzh ar proteinoù* pe *iod proteek* (PBI, Protein Bound Iodine) (4 da 8 μ g %), ouzh e ober ur rann anhormonel (iodotirozinoù) hag ur rann hormonal, douhennadus dre ar butanol, pe *iod hormonal* (BEI, Butanol Extractive Iodine), o c'hoarvezout eus an tiroksin (T4) ereet ouzh ar protein (3 da 8 μ g) hag, a feur leiek, T4 diere ha T3 ; er skoedisvorc'hegezh e vez usvec'hiek an *iod proteek* (< 3 μ g) hag an *iod hormonal* (< 2 μ g) ; er skoedusvorc'hegezh e vez usvec'hiek an *iod proteek* (> 9 μ g) hag an *iod hormonal* (> 8 μ g).

iodide ◇ **iodine eruption** ◇ **iodid g.** Dispuilhad gloevennek devoudet gant an iod (sl. *halogénide*).

iodisme ◇ **iodism** ◇ **iodegezh b.** Strafuihoù diwar ar pistriadur gant an iod.

iodophilie ◇ **iodophilia** ◇ **iodlen** g. Lenidigezh ouzh an iod a-berzh kelligoù 'zo, enno glikogen, o wiskañ ul liv gell gant ar c'hediuzennoù iodet.

iodure ◇ **iodide** ◇ **iodidenn** b. Haliou an drenkenn iodhidrek HI; an hini arveretañ er yac'h hadurezh eo an *iodidenn galiom*, diouezet evit tol'e hañ dilaosk an tiroksin a-raok un oberatadenn war ur skoedenn usvorc'hek, pe evit gwareziñ ar bevedeg diouzh an euverin skinoberiek (sl. *iode radioactif*).

iodurie ◇ **ioduria** ◇ **troazhvec'h** g. **iod**, **iodtroazhvec'h** g. Feur an iod en troazh, uheloc'h gant ar vazdoveion; daou seurt *prouad an iodtroazhvec'hiañ* (Gl. *test de l'i. provoquée*) a vez embreget: 1) (Laroché) pa ensinkler iod dre ar wazhienn e vuia un troazhvec'h iod nebeutoc'h gant ar vazdoveion; 2) (Trémolières ha Chéramy) an euverin eoul iodet a zelank un troazhvec'h iod pa vez reol feur al lipaz er sugoù koazhañ endra van aniodek an troazh en ezvezañs an enzim-se.

ion ◇ **ion** ◇ **ionenn** u. (s. : **ion**) Atomenn pe stroll atomennoù kollet pe paket ganto un pe lies elektronenn ha dre se gounezet ur bec'hiad tredan muiel (*ionenn vuie*l pe *kationenn*, sk. : H^+ , Ca^{++} , NH_4^+) pe leiel (*ionenn leiel* pe *anionenn*, sk. : Cl^- , OH^- , CO_3^{--}).

ions : **échange d'** ~ ◇ **ion exchange** ◇ **eskemm** g. **ion** Dazgwered e gorre ur sonnenn e diastok ul liñvenn : a) delen an ion diwar goust al liñvenn a reer anezhañ an *amsunañ* (sl. *adsorption*); eus an kez ion e reer an *amolc'had* (sl. *eluat*); b) deloc'h an ion diouzh ar gorre sonnel a anver an *ec'hamsunañ* (sl. *désorption*); *amolc'her* (Gl. *éluant*) pe *dileizher* (Gl. *solvant*) a reer eus al liñvenn hag *amolc'hiñ* (sl. *élution*) eus an deloc'h e unan; ur roll bevedel bras zo gant hevelep eskemmoù; a du 'rall, korvo a c'hounezet ganto evit dic'harvañ an dour, eleze leiaat ennañ tenor an ion kalkiom (Ca^{++}) dre erlec'hiañ outo ion natriom (Na^+); talvezout a ra ivez an eskemm ion el *livnizhañ en arvez liñvel* (Gl. *chromatographie en phase liquide*) evit disrannañ hag elfennañ ar meskadoù (sl. *chromatographie*).

1 ionisation **2 ionisation**, **ionophorèse** ◇ **1 ionization** **2 iontophoresis** ◇ **1 ionaat** **2 ionnizhañ** 1 Dinodiñ ion diouzh atom pe volekul. 2 Ebarzhiñ ion er bevedeg diwar-bouez ur red untu izelread hag elektrodoù warno un danvez spoueek intret gant an dileizhenn yac'hadel, prederiadur lec'hiek eus laurioù 'zo.

ionogramme ◇ **ionogram** ◇ **ionrestrad** g. Deluniad pe kevregad o terc'hennañ bec'h an ion diseurt bezant en ul liñvenn (er plasma, da skouer) dewerzhet e milikevatalioù.

ionothérapie ◇ **ionotherapy** ◇ **iongurañ** Rann eus an tredangurañ, ebarzhiñ liaoù a-dreuz d'ar c'hroc'hen bonan diwar-bouez redoù tredan (sl. *ionisation*).

iotacisme ◇ **iotacisme** ◇ **yefleañ** Kammzistagañ ar soniadoù [g] pe [ʒ] dre erlec'hiañ outo ar soniad [j]; sk. : Br. *genn* distaget [jɛn], Gl. *jambe* distaget [jãb].

ipéca ◇ **ipecacuhana**, **ipéca** ◇ **ipeka** g. Gwrizienn brousgwez suamerikat, *Uragoga ipecacuhana*, a zouhenner anezhi alkaloïdoù, en o zouezh an emetin (sl. *émétine*).

iridectomie ◇ **iridectomy** ◇ **envezzenañ** Dazbidañ darnel ar ganevedenn evit reiñ digor d'ar skinoù luc'h (*e. optikel*), evit parraat ouzh an danijenn (*e. enepfo*, Gl. *i. antiphlogistique*) pe evit kehentaat kambroù araok hag adreñv ar voull lagad (*e. trobarzhel*, Gl. *i. périphérique* pe *e. enepglaokom*, Gl. *i. antiglaucomateuse*).

iridocèle ◇ **iridocele** ◇ **envezogad** g. Balirad an envez a-dreuz d'ur gouli er gornsa.

iridochoroïdite ◇ **iridochoroiditis** ◇ **enveztolgennsaefo** g. Tanijenn an dolgennsae, kevret gant tanijenn ar ganevedenn (sl. *choroïdite*).

iridocyclite, **uvéïte antérieure** ◇ **iridocyclitis** ◇ **koraelenvezfo** g. Envezfo pe enveztolgennsaefo kevret gant tanijenn ar gorael, anaez adfeillus en ervez da zec'han glenelloù etre an envez hag ar ferenn (sl. *cyclite*).

iridodialyse ◇ **iridodialysis** ◇ **1 envezrogad** g. **2 iridodializ** g. 1 Digrakad daraezel ur gennad eus an envez diouzh e wriazienn. 2 Gwezh surjaniel, anezhañ dizenlenañ ha digrakañ un drailhenn eus an envez en amkan parañ ar mab lagad kalvezadel.

iridologie ◇ **iridology** ◇ **envezouriezh** b. Studi an envez a ve naouusterioù anezhañ oc'h erzerc'haat kenttuadurioù hilel pe arzeuat da anaezioù 'zo.

iridoplégie ◇ **iridoplegia** ◇ **envezseizi** g. Seizi kigennoù an envez.

iridoscopie ◇ **iridoscopy** ◇ **envezselliñ** Imbourc'hiñ an envez.

iridotomie, **iritomie** ◇ **iridotomy** ◇ **envezbenañ** Gwezh surjaniel, anezhañ skejañ an envez war-benn dewerc'hañ ar mab lagad kalvezadel.

iris ◇ **iris** ◇ **kanevedenn b.**, **envez** g. Rañvell livegat kelc'hiek a-zerc'h etre kambroù araok hag adreñv al lagad, oc'h arouleviañ entreu al luc'h dre argemañ ment he igorad kreiz, ar mab lagad, diwar-bouez he c'higennoù kelc'hstrishaer ha frankaer; gant ar gorael, ma enlen, ez a d'ober lodenn araok gwazhiedsae al lagad.

iritis ◇ **iritis** ◇ **envezfo** g. Tanijenn an envez, erzerc'h dre an daeraouiñ, al luc'hgaz hag ur ruzder en dro d'ar gornsa; kevredet e vez alies gant ar c'horaelenvezfo (sl. *iridocyclite*).

IRM, **RMN** ◇ **MRI**, **NMR** ◇ **SDG**, **DGD** Teskanvioù evit ar *gwarellwreañ* pe *skeudennerezh dre zasson gwarellec'herc'hanel* (sl. *imagerie médicale, résonance magnétique nucléaire*).

1 irradiation, radiation, rayonnement 2 3 irradiation ◇ **1 radiation 2 3 irradiation** ◇ **1 skinañ 2 skinata 3 saezhenniñ** 1 Ec'hodiñ skinoù. 2 Arloañ skinoù ouzh bevedegoù pe danvezennoù a orin loenel pe struzhel. 3 Treledañ ul laur eus ur bennsez da lec'hioù pell pe belloc'h, sk. : *laur ar c'hevenkez o saezhenniñ war-du an ezel krec'h kleiz.*

irrig-

• *arrêt de l'irrigation du cœur* astal eroueriadur ar galon • *échanges respiratoires entre le sang circulant et les tissus irrigués* an eskemmoù analadel etre ar gwad amredat hag ar gwiadoù eroueriet • *insuffisance chronique de l'irrigation* skorted henek an eroueriañ • *les alvéoles non irriguées pour des causes pathologiques* al logigoù aneroueriet dre arbennoù kleñvedel.

irrigraphie ◇ **irrigraphy** ◇ **erouerluniñ** Kalvezder erc'hwiliañ gwazhiedadur an izili traoñ dre ar pletismografiñ.

irritabilité ◇ **irritability** ◇ **1 fraouadusted b. 2 hegadusted b., hegeuzded b. 3 brouezusted b.** 1 Perzh ar gwiadoù hag an organoù bev oc'h ober dezho erwezhiñ dindan wered ur broudad diavaez pe diabarzh. 2 Erwezhiusted reñverek ur gwiad, un organ ouzh ur broudad. 3 Tuadur da daeriñ, da ersaviñ gant buanegezh.

irritation ◇ **irritation** ◇ **1 hegadur g., hegeuz g., tanailh g. 2 brouez b.** 1 Tanijenn leiek en ur gwiad, un organ. 2 Taerijenn, ersav buanek.

irrit-

• *cœur irritable* kalon hegeuziek • *intense irritation de la muqueuse intestinale* tanailhad garv glaourgenn ar pervez • *irritation du faisceau spinothalamique* tanailh ar stirad livenn-derc'hvel • *irritation oculaire* hegeuz lagad • *laxatif doux, peu irritant* laoskuzenn c'hwek, amhegus • *pour ce qui est de l'étiologie de l'eczéma, classiquement on oppose les irritations internes et externes* evit a sell arbennelezh an ekzema, ent klasel e lakaer kemm etre an hegadoù diabarzh hag an hegadoù diavaez • *purgatif dont l'action est irritante* spurjuzenn hegus he gwered • *stimuler le péristaltisme par irritation de la muqueuse* kentraouiñ an amdonnegezh dre hegañ ar glaourgenn • *substance irritante* danvezenn danaillhus.

ischémie ◇ **ischaemia** ◇ **heskwad g.** 1 Leiñd pe astal an amred talmerel en un tiriad kantet. 2 (Kalonvarrwezañ) kentrañ derez gouzañvadur ar c'haheer kalon da heul steviadur ur gurunerenn, erzerc'h er c'halonvarrwezañ dre zaralladoù ar wagenn T.

ischémie myocardique silencieuse ◇ **silent myocardial ischaemia** ◇ **heskwad enkelat ar c'haheer kalon** Leielaat dibad ar wagenn T o tarvezout e-maez nep arouez klinikel, a stader da geñver ur prouad strivañ pe ur c'halonvarrwezañ hirbad war ar skorteion gurunerel, ha ganto gouzañvet c'hoazh pe get glazoù kalon.

ischémie-lésion : syndrome d'~ ◇ **ischaemia-lesion syndrome** ◇ **azoniad heskwad-anaf** Daralladur ar c'halonvarrwezañ stadet e-doug angwazhiad ar c'haheer kalon, naouus dre zislank an arroud ST (gwered anaf) heuliet gant ur wagenn T troet war-enep d'an dislank (gwered heskwad).

iso-immunisation ◇ **isoimmunization** ◇ **hangaeañ unspesadel, unspesadhangaeañ** Dinod antikorfoù en ur bevedeg bet keraezet gant un antigen o tont eus un hinienn a un spesad gantañ, da skouer pa zegemer un den hemati unan all, enno avat un aglutinogen ezvezant en e wad dezhañ; an *h. u.* ar paoañ eo hini an dud Rh – o tanzen un antikorfoù o tazgludañ an hemati Rh + (sl. *incompatibilité fœtomaternelle, Rhésus : facteur* ~).

isoagglutination ◇ **isoagglutination** ◇ **dazgludañ unspesadel, unspesaddazgludañ** Dazgludañ o tarvezout etre gwadoù hiniennoù a un spesad.

isoallergie ◇ **isoallergy** ◇ **allergiezh b. unspesadel, unspesadallergiezh b.** Stad allergiezh dec'hanet en un hinienn gant keraez un antigen o tont eus un hinienn a un spesad ganti.

isoandrostérone ◇ **isoandrosterone** ◇ **izoandrosteron g.** Hormon androgen douhennet eus an troazh, anezhañ unan a 'r 17ketosteroid deveret diouzh an testosterone (sl. *androgène : hormones ~s, 17-cétosté-roïdes, testostérone*).

isoanticorps, alloanticorps ◇ **isoantibody** ◇ **antikorf g. unspesadien, unspesadantikorf g.** Antikorf gwadvezel oc'h erwezhiñ ent spesadel ouzh un antigen o tont eus un hinienn a un spesad.

isoantigen, alloantigen ◇ **isoantigen** ◇ **antigen g. unspesadien, unspesadantigen** Antigen en araez d'ober parañ antikorfoù gant un hinienn a un spesad.

isochromosome ◇ **isochromosome** ◇ **izokromozom g.** Kromozom ezreol o tisoc'h eus un emrannadur arizhek eus ar c'hentromer, dezhañ div vrec'h keit ha stalet a-zrec'h.

isochrone ◇ **1 isochronous 2 isochron** ◇ **1 keitpad aa. 2 kempadrezh aa. 3 kfeleiapad aa.** 1 (Ster hollek) dezho padoù par, sk. : *keitpad e vez luskelladoù ur momeder*. 2 (Stlenneg) a-zivout un arhent niverel kellusket dre ur padrezh, eleze a zo e werzhadoù kenheuilh par d'ul liesad eus ar padrezh (Gl. *base de temps*). 3 (Nervouriezh) a-zivout div nervwienn, div gigenn pe un nervenn hag ur gigenn, dezho leiapadoù par (sl. *chronaxie*).

isochronisme : loi de l'~ ◇ **law of isochronism** ◇ **saveleñn b. ar c'hefleiapad** Saveleñn bet dezgeriet gant Lapicque : amplegad treuzkas an nervlan eo parder al leiapadoù kenetre an nervwiennoù pe etre an nervenn hag ar gigenn.

isocinétique, isokinétique ◇ **isokinetic** ◇ **1 keittizh aa. 2 keittizhek aa.** 1 A-zivout ur fiñv, graet en un tizh arstalek. 2 El Leuñvouriezh, er sport, azivout un embregad o c'hoarvezout a fiñvoù keittizh.

isocoagulabilité ◇ **isocoagulability** ◇ **hegaouledusted** Reolded an araezusted da gaouledañ, andalet dre vuzuliañ buanez kaouledañ ar gwad (sl. *coagulabilité, hypercoagulabilité, hypocoagulabilité*).

isocorie ◇ **isocoria** ◇ **keitvab g.** Parder treuzkiz an daou vab lagad.

isocortex, néocortex, néopallium ◇ **isocortex, neocortex, neopallium** ◇ **izokorteks, neokorteks, neopalliom** Lodenn diorreetañ hag, ent hildarzhel, nevesañ eus pluskenn an empenn, o c'hoarvezout a c'hwec'h gwiskad kelligoù hiniennaet mat.

isocytose ◇ **isocytosis** ◇ **keitkellig g.** Parder ment ar c'helligoù ruz, hag int peurliesañ a vent reol (*ruzhevent*, sl. *normocytose*).

isodactylie ◇ **isodactylism** ◇ **bizkehed g.** Parder hed ar bizied, hag int berr ha diazet tev (sl. *brachydactylie*).

isodiastolique ◇ **protodiastolic** ◇ **keitdiastole aa.** A-zivout al lankad eus deroù an diastol kofigel ma tigresk ar gwask ha ma chom arstalek ec'honad ar gwad er c'hofigoù (sl. *isovolumétrique*).

NOTENN : Kudenn a save evit an aozerion gallek ha saoznek : al lankad desellet n'eo ket an *deroù-diastol* (Gl.Sz. *protodiastole*) en e bezh, met ar pred kentañ anezhañ, ken ne zave ket Sz. *protodiastole* ha *protodiastolic* d'un an ergeñverenn; trap bet hepcoret gant lunierion an adanv Gl. *isodiastolique*, kurzhad diwar "rann eus an *diastol* ma chom ar c'hofigoù *keidec*"honad (Gl. *isovolumétrique*). Kredet 'm eus amprestañ an tun-se evit sevel an termen brezhonek.

isodynamie ◇ **isodynamic** ◇ **keitgremmus aa.** A-zivout kementadoù bouedoù kevarall o pourchas an hevelep kementad gremm.

isodynamie des aliments ◇ **food's isodynamia** ◇ **keitgremmusted b. ar bouedoù** Parder ar c'hremmusted er bevedeg etre tolzoù kevarall a 'r maguzennoù (protid, lipid, glukid); da skouer, pourchaset e vez 1kJ gant 0,062 g glukid pe protid ha gant 0,027 g lipid; er Vezhourouriezh avat, ne zalc'her ket kont eus *gremmusted krai* ar maguzennoù pa goll ar re-mañ, dre benn ar bevelaat, ul lod eus o gremmusted (ar glukid 6 %, al lipid 14 %, ar protid 30 %), ken e solier war o *gremmusted rik* (a anver c'hoazh *gwered dialuskel spesadel*, sl. *action dynamique spécifique des aliments*) : ent werc'hek e vez rekis 0,066 g glukid, 0,072 g protid, 0,038 lipid evit lakaat 1 kJ e kerz ar c'hennevid; a du 'rall, evit a sell saveladur an hanrenoù emvagañ ned eo ket keveskemmadus ar bouedoù, pep hini o vezañ diziouerus evit degas danvez dafar spesadel d'ar gwadoù hag, e dibenn dezrann, evit derc'hel ar c'hempouez mezhuere (sl. *déséquilibre alimentaire : syndrome du ~, équi-libre nutritionnel, régime alimentaire*).

isoélectrique : ligne ~ ◇ **base line** ◇ **regenn b.geittredan, diazregenn b.** Linenn a-zremm er c'halonvarrwezd o verkañ stad paouez ar galvanometr, pa na vez red kalonel ebet o tremen dre ar c'halonvarrwezer.

isoélectrique : point ~ ◇ **isoelectric point** ◇ **keitredanverk g.** Gwerzhad eus pH ur metoù a zo ennañ un ueleizhid keitrannet etre ion trenkek ha bazek e doare ma 'z eo neptu.

isogénique, isologue, syngénique ◇ **isogenic** ◇ **hilunglad aa.** A-zivout div hinienn dezho an un glad hilel, hag int unreek pe allreek, da skouer gevelled unviel, klonoù.

isogrefe, greffe isogénique ou isologue ou syngénique ◇ **isograft** ◇ **imboud g. unhilien, unhilimboud g.** Ensezañ un imboudenn gorreet diwar un hinienn hilunglad, ur gevell unviel pe, en imbours'hva, diwar ul loen a ouenn bur (sl. *greffe, greffon*).

isogroupe ◇ **pertaining to the same blood group** ◇ **unrizh aa.** Eus an hevelep rizh gwad (sl. *groupes sanguins*).

isolat ◇ **isolate** ◇ **dredad g.** 1 Bodad hiniennoù o vevañ hep darempered gant ar poblañsoù all. 2 Diuzad puraet kelligoù, bakteri pe viruzoù.

isol-

- *atrophie corticale isolée* pluskennisteñv digevret • *bactéries isolées ou groupées par deux* bakteri distroll pe bodet dre ziv
- *blocage méningé isolant un ou plusieurs ven-tricules cérébraux* kaelad pilhonet eskantet gantañ un pe lies kamb empenn
- *chancres isolés* livant unek • *défaut d'isolation* diouer disfuñ • *enceinte calorimétri-que isolée du milieu environnant* gwrezenkae disfu diouzh an amva • *encéphalite isolée ou associée à une atteinte des méninges* empennfo dredad pe kevret gant tizhad ar pilhon
- *isolement autistique* emdenn aotegezhel • *isoler chirurgicalement une partie du côlon* dredañ surjaniel ur parzh eus ar c'holon
- *panneaux isolants* panelloù disfuñ • *substances isolées de champignons* danvezennoù goubarret diouzh foue • *trouble de la marche, isolé de toute altération de la force musculaire* strafuilh ar c'herzhed, digevret diouzh nep direzih en nerzh kaherel.

isoleucine ◇ **isoleucine** ◇ **izoleukin g.** Amindrenken alifatek bevret, parzhiat er proteinoù.

isoleucoanticorps ◇ **isoleucoagglutinin** ◇ **izoleukoantikorf g.** Antikorf gwadveizel gwazhus ouzh leukokit un hinienn unspesad.

isomérase ◇ **isomerase** ◇ **izomeraz g.** Nep enzim o treluskañ dazgweredoù izomerifñ.

isomères ◇ **isomers** ◇ **izomeroù l. (g.)** Molekul hevelep o delun krai, kevarall o zrevnadur egorel hag o ferzhioù fizikel ha kimiek.

isomérisation ◇ **isomerism** ◇ **izomeriezh b.** Keñver etre molekul a zelunioù krai heñvel; diforc'hiñ a reer : *a*) an *i. soazel* (Gl. *i. de fonction*), etre molekul a zelunioù divvent disheñvel, dezho steudadoù soazel kevarall, *b*) an *i. savlec'hel* (Gl. *i. de position*), etre molekul a un strolloù soazel, ar re-mañ stalet disheñvel, *c*) an *i. frammadel* (Gl. *i. de structure*), etre molekul dezho an un strolloù soazel ha digorvelloù skoultrennek kevarall, *d*) an *i. ec'honel* (Gl. *i. géométrique*), etre molekul a zelunioù divvent heñvel hag a zelunioù teirment disheñvel, *e*) an *i. drec'hel* (Gl. *i. optique*), anezhi un dro dibarek a 'n izomeriezh ec'honel, molekul an eil korf o vezañ skeudenn velezour molekul egile.

NOTENN : Hiroc'h war an *izomeriezh* a gaver e La-09 423-429.

isomérisme ◇ **isomerism** ◇ **keitlun g.** Kammeuziad, anezhi unrezhded daou luniad korfadurel a vez kevarall ent reol, sk. : *dehougeitlun ar skevent* (Gl. *dextro-isomérisme pulmonaire*), ar skeventenn gleiz o vezañ kammeuziet ha kemparzhkek

d'ar skeventenn dehou; *kleizkeitlun ar c'hentezioù* (Gl. *isomérisme atrial gauche*), ar c'hentez dehou, kammneuziet, dezhañ an un lun hag ar c'hentez kleiz.

isométrique ◇ **isometric** ◇ **keitvent** aa. O c'hoarvezout hep ma argemm ar mentoù, sk. : *argrezañ k. ar c'hofigoù* (Gl. *contraction i. des ventricules*), lankad kentañ eus ar sistol, etre serridigezh an trapigoù kentez-kofig ha digoridigezh an trapigoù kornloarek, ma kresk ar gwask er c'hofigoù hep ma argemm o ec'honad; *arlaoskiñ k. ar c'hofigoù* (Gl. *relaxation i. des ventricules*), lankad kentañ eus deroù an diastol, etre serridigezh an trapigoù kornloarek ha digoridigezh an trapigoù kentez-kofig, ma tigrask ar gwask er c'hofigoù hep ma argemm o ec'honad.

NOTENN : Pa vez un ec'honad eus an egorad desellet, ez arverer an eil pe egile eus an daou heñvelster *keitvent* ha *keidec'honad* (Gl. *isométrique* hag *isovolumétrique* pe *isovolumique*).

isomorphe ◇ **isomorphous** ◇ **keitdelun** aa. A-zivout korfoù a hevelep delunioù krai, diseurt avat kenstaladur an atom enno (sl. *isomérie*).

isoniazide ◇ **isoniazid** ◇ **izoniazid** g. Deanvadur boutin an *drenkenn izonikotinek hidrazid (INH)*, korf bakteriharzh *in vitro* ouzh bazhilli Koch, gweredus kenan *in vivo* ouzh an dorzhellegezh.

isopathie ◇ **isopathy** ◇ **izopatiezh** b. Doazhadur bet dezgeriet gant Hippokrates dre an hebadell "pezh a ro ar c'hleñved en pare ivez" ha gwerc'hekaet gant Pasteur dre ar vaksinerzh.

isophane ◇ **isophane** ◇ **keitneuz** aa. A-zivout un hiron dezhañ neuz (*fenotip*) unan eus an daou seurtad orin hag ur glad hilel (*genotip*) dibarek.

isoprénaline ◇ **isoprenaline** ◇ **izoprenalin** g. Amin simpatomimetek kevanaozel (*izopropil-noradrenalin*), fraouaer an adren-vuzerioù β.

isorrythmique : **dissociation** ~ ◇ **isorrhythmic dissociation** ◇ **distroll** g. **keitkorvezel** Seurtad distroll kentez-kofig dre zaremouezh ma vez kentezoù ha kofigoù o lammat herrek ha kendizalc'h, ar wagenn gentezel P o hañvalout "neuenniñ" en dro d'ar wagenn kofigel R (sl. *dissociation atrioventriculaire, inter-férence I*).

isosexuel ◇ **isosexual** ◇ **eorevel** aa. Kempleg d'an emdreiñ revel reol, ar rev hilel (Gl. *sexe génétique*) hag ar rev c'honadel (Gl. *sexe gonadique*) o kenglotañ.

isoporidae ◇ **isoporiasis** ◇ **izosporiaz** g. Poread pervez grevus diwar *gokidi* eus ar genad *Isospora belli* o tizhout an hangaeastaleion (sl. *coccidies, immunodépresseur*).

isosthénurie ◇ **isosthenuria** ◇ **keitdouester** g. **troazh** Arstalegezh tolzder ec'honell (douester) a 'n troazh en dro da 1 010 g/l, eleze da zouester reol plasma ar gwad dibroteinet; erzerc'haat a ra koll galloud devec'hiañ-tanaviñ al lounezh a stader e skorted henek al lounezh hag ivez e skorted henek an uslounezhenn.

isothermie cutanée ◇ **cutaneous isothermy** ◇ **keitwrez** b. **kroc'hen** Parder ar gwrezverk e pep poent eus ar c'hroc'hen, stadet e kleñved Basedow.

isothermognosie ◇ **isothermognosis** ◇ **gwrezandigemm** g. Furm andenaoud, anezhi dic'halloud da lakaat kemm etre yen ha tomm.

isotonie, isotonisme ◇ **isotonia** ◇ **keitgrenn** g. Stad div liñvenn, div zileizhenn a zo dezho an hevelep grenn; pa vezont dispartiet gant ur gennenn dreleizhiñ, ne c'hoarvez red ebet etrezo.

isotonique ◇ **isotonic** ◇ **1 kengrennek** aa. **2 keitwask** aa. 1 A-zivout ul liñvenn, ganti an hevelep grenn hag ul liñvenn all kemeret da zave, anezhi ar gwad peurliesañ. 2 A-zivout un anadenn, ma chom arstalek ar gwask keit ma pad, sk. : *argrezañ k. ar c'hofigoù* (Gl. *contraction i. des ventricules*), eil lankad a 'r sistol etre digoridigezh ha serridigezh an trapigoù kornloarek ma tigrask ec'honad ar c'hofigoù endra ziflistront ar gwad dindan wask arstalek (sl. *isométrique*).

isotope ◇ **isotope** ◇ **izotop** g. An izotopoù zo elfennoù kimiek dezho an un niverenn atom, an un perzhioù kimiek enta (an un niver proton en o derc'han), pep a dolz avat (pep a niver neutron en o derc'han).

isotrope ◇ **isotrope** ◇ **nebahelek** aa. A-zivout ur metoù a zo dizalc'h e berzhioù fizikel (optikel, loc'honiel, h.a.) diouzh an durc'hadurioù egorel.

isotype ◇ **isotype** ◇ **kevnurizheg** g. -où, **izotip** g. -où Hanload antigen boutin etre antikorfoù a un rumm, unrezh gant holl hiniennoù ur spesad (sl. *allotype, antigénique : site ~, idiotype, isotypie*).

isotypie ◇ **isotypy** ◇ **kevnurizh** g., **izotipiezh** b. Unrezhded antigenel an immunoglobulinoù etre holl hiniennoù ur spesad.

isthmoplastie ◇ **isthmoplasty** ◇ **strizhatelviñ** Azneuziañ surjanel strizh an aortenn enkaet gant ur goudag.

itération ◇ **reiteration** ◇ **arredeiñ** Arren andiarvenn, herrek ha diamkan jestroù ha komzoù (*daradfiñval, daradluzañ, drec'h-luzañ, drec'hskrivañ, drec'hveidiñ*, h.a.) (sl. *échographie, écholalie, échomimie, palicinésie, palilalie*).

Ixodidés ◇ **Ixodidae** ◇ **Iksodideged** l. (g.) Kerentiad amprevaned eus urzhad an Akarianed, kevrennad an Araknid, skourrad an Arthropod, sk. : an *tarlask* (sl. *borréliose, tique*).

J

J : onde ~ ◇ **J wave** ◇ **gwagenn b. J** Gwagenn a 'r c'halonvarrwezaad staded da geñver an iswrez vuiek, o tennañ he anvad eus he loadur er junt etre QRS ha T, anezhi un uslivead an arroud ST argeinek war grec'h, oc'h enbollañ darn diwezhañ ar wagenn herrek.

J : point ~ ◇ **J point** ◇ **poent g. J** Poent juntañ etre ar wagenn herrek QRS hag an arroud T er gemplezh kofigel.

Jaccoud-Osler : maladie de ~ ◇ **subacute bacterial endocarditis** ◇ **kleñved Osler, kleñved Jaccoud-Osler, enkalonennfo bakteriel goulemm** Enkalonennfo poreel yud eilvedel d'ur c'halonnaoued trapigel rakvezant, peurliesañ diwar *Streptococcus viridans*, o tedreñ gorrek, manguñv gant resmiadoù terzhienn, arzostoù ha sourr kalon, tizhadoù kroc'hen (ozvennoù Osler, purpura, fennigoù), darvoudoù flugezel (angwazhiad al lounezh, ar felc'h, al luc'hsae, an empenn, ar pervez, h.a.) hag anafoù talmerel (entalmerennfo, darvoll); kent oadvezh ar bevastalerioù e veze marvus war verr dermen (sl. *endocardite bactérienne*).

Jackson : syndrome de ~ ◇ **Jackson's syndrome** ◇ **azoniad Jackson** Kevreted seizioù untu eus ar ouel stavn, an teod, ar c'harloc'henn, ar c'higennoù tristuriek ha klerenn-brennigenn a stader en anafoù an hirvel.

jacksonien : épilepsie ~ ou **bravais-jacksonienne** ou **corticale partielle** ◇ **jacksonian epilepsy** ◇ **droukfell g. jaksonek pe pluskennel darnek** Droukfell darnek loc'hadel, gant deroù kenskiantek, naouus dre gridoù o tizhout ur stroll kigennoù er vrec'h, en dremm pe er vorzhed, en ervez da emastenn d'al ledkorf a-bezh pe da vont hollek gant koll kenskiant; furm droukfell ageñver gant hegadur un takad eus ar bluskenn lec'hiet en droenn raknen a-eiltu da erzerc'hadoù an droukfell.

Jacobs : syndrome de ~ ◇ **Jacobs' syndrome** ◇ **azoniad Jacobs** Kroc'henfo gourc'hennek a 'r gousac'h, genaoufo ha kevresaefo a staded gant prizonidi amerikan Japan e-doug an eil Brezel bed (negez vitamin B₂).

Jacod : triade de ~ ◇ **Jacod's triad** ◇ **triadezh b. Jacod** Kevreted lagadseizi hollel, steuzwel ha nervost trigevell, naouus da azoniad ar perenneg karregenn-genneg.

Jacquemer : manœuvre de ~ ◇ **Jacquemer's maneuver** ◇ **kefleuñvad g. Jacquemer** Kalvezder gwiliouderezh e degouezh mieskor an divskoaz azdalc'het el lestr ur wech tremenet ar penn, anezhañ gouzizañ brec'h adreñv ar grouell hag e se erlec'hiañ ouzh an treuzkiz divgerskoaz an treuzkiz kazel-kernskoaz, berroc'h hag aesoc'h dezhañ diskenn dre ar c'hulvaou.

Jaffe-Lichtenstein : maladie de ~, **ostéomatose kystique, dysplasie fibreuse des os** ◇ **Jaffe-Lichtenstein-Uelinger disease** ◇ **kleñved JaffeLichtenstein** Seurtad miwe stirek an eskern o tinodiñ er vugeliezh pe ar c'hrennoad, naouus, *ent neuziadurel*, dre wiad stirek o c'henniñ kistoù en eskern, en izili traoñ da gentañ, hag, *ent klinikel*, dre un dedro hir tre ha resmiadoù laurioù, distummadurioù an eskern, torroù emdarzh; reol e vez gwadvec'h ar c'halkiom, ar fosfor, ar fosfatazoù hag ar c'holesterol.

Jamaïque : maladie des vomissements de la ~ ◇ **Jamaican vomiting sickness** ◇ **kleñved jamaikan ar c'hweladoù** Pistriadur da heul euvriñ frouezh *Blighia sapida*, oc'h erzerc'hañ trumm dre c'hweladoù, glizi, koma hag o tedreñ herrek d'ar marv.

jambe ◇ **leg** ◇ **gar b. divc'har** Rann eus an ezel traoñ etre ar glin hag an ufenn.

NOTENN : Er yezh voutin ez anver *gar* gwech an *ezel traoñ* en e bezh, gwech an eil rann anezhañ, hag e reer eus *divc'har* ur c'henster da *divesker*.

jambe : manœuvre de la ~, **manœuvre** ou **épreuve** ou **signe de Barré (membre inférieur)** ◇ **Barré's sign of the leg** ◇ **kefleuñvad ar c'har pe proudad pe arouez Barré en ezel traoñ** Kefleuñvad renet war-benn dinoiñ gouzeizi leiek un ezel traoñ : ar gouziviad o vezañ er rakgourvez, pleget a-skouer e zaoulin e doare m'emañ e zivc'har a-zerc'h, e c'houziz hag e kouezh war ar gwele ar c'har e tu ar gouzeizi.

jambes sans repos : syndrome des ~ ◇ **restless legs syndrome** ◇ **azoniad an divesker dihabask** Anglevadoù displijus e-barzh an divesker, hegaserezh don en o c'higennoù, pikadurezh, kemenerion hag ezhomm kemmañ lec'h dezho dizehan, kevret gant stroñsadoù trumm hag a-wechoù laurioù, o tarvezout en abarzaez pe en noz gant ar gouziviad en e goazez pe gourvezet; ne vezont sioulaet nemet dre ar c'herzhed; dianav e chom an arbenn anezho.

Janus : syndrome de ~ ◇ **Bret's syndrome** ◇ **azoniad lanus, azoniad Bret** A-zave d'an doue roman divzremm lanus, dargemm skinourel etre an div skeventenn, an eil o vezañ sklaer hag eben teñval gant uspoulzusted talmerel, arvez naouus da

galonnaouedoù ganedigel; stadet e pevardezh Fallot gant talmerenn skevent untu; aozerion 'zo a astenn an anvad d'an holl azoniadoù ussklaerded skevent untu, ha pa vent a orin amredel pe wentadel (emfizem stevius) (sl. *MacLeod : syndrome de ~, poumon évanescent*).

Jarcho-Levin : syndrome de ~, dysplasie spondylothoracique ◇ **Jarcho-Levin syndrome** ◇ **azoniad Jarcho-Levin, miwe melloù-brusk** Doaread askornvibar melloù-kostoù treuzkaset er mod enkilek aotozomek, naouus dre verrded ar c'hef, balirad arak ar glerenn, enebrezh aront gant ledanadur an tal, gwriizenn ar fri hag ar genoù, biziéd gwerzhidek; dre ar skinwerañ e stader lies ledvelenn ha kostoù kenforc'hek; marvus war verr dermen dre boreadur analadel.

jargonaphasie ◇ **jargonaphasia** ◇ **jagouilherezh g., darallgomz g.** Kammezuz neuziadel, furm eus ankomz Wernicke, ma c'hoarvez steuñvenn ar gomz eus un heuliad unvezioù lavar dislenadek (sl. *aphasie de Wernicke, cacolalie*).

Javel : eau de ~ ◇ **Javel water** ◇ **dour javell** Dourzilezhenn hipoklorit natriom (NaClO) arveret da zilestañ, da buaat an dour evañ, da zigriazañ al lien (sl. *chloration, Dakin : liqueur de ~, javellisation*).

javellisation ◇ **javellization** ◇ **javellañ, javellerezh g.** Araezad dishadennañ an dourioù amkanet d'ar beveziñ, anezhañ azdodiñ outo ur c'hementad dour Javel bras a-walc'h evit distrujañ an danvezioù bevel hep darallañ o ferzhioù merzhadennel.

jejunoplastie ◇ **jejunoplasty** ◇ **yunegennatelviñ** Dazluniañ surjanel evit kempenn furm hag arc'hwelerezh ar yunegenn.

jejunostomie ◇ **jejunostomy** ◇ **yunegennezforzhañ** Savelañ un adc'henoù ouzh-tu pe ouzh-penn, padennek pe trebadek, dre skarvañ ar yunegenn ouzh speur ar c'hof war-benn magañ ar gouziviad pa vez dic'hallus ar c'hreuzezforzhañ.

jejunum ◇ **jejunum** ◇ **yunegenn b.** Lodenn anfest ar vouzellenn voan, etre an daouzegenn hag ar glunegenn.

Jellinek : signe de ~ ◇ **Jellinek's sign** ◇ **arouez Jellinek** Uslivegadegezh ar malvennoù a stader gant 20 % eus gouziviaded kleñved Basedow.

jennérien ◇ **jennerian** ◇ **jennerel aa.** A-zave d'ar vaksin enepbrec'h.

Jensen : chorioretinite de ~ ◇ **Jensen's disease** ◇ **tolgenmluc'hsaefo g. Jensen** Tanijenn an dolgennsae hag al luc'hsae nens-begenn aloubus, argizus hag adfeilhus, a orin toksoplasmel.

Jersild : syndrome de ~, éléphantiasis génito-ano-rectal ou ano-recto-génital ◇ **anogenital elephantiasis** ◇ **elefanti-aziz g. fraezhganadel** Kevreted isvull poreien a 'r youle'h, c'hwarrenn hag elefantiaziz ar c'harbedenn, e dianlen ur poreadur eus reizhiad limfel ar rannbarzh, oc'h erzerc'haat kleñvedoù diseurt : kleñved Nicolas-Favre, sifiliz, torzhellegezh, aktinomikoz.

jet : lésion de ~ ◇ **jet lesion** ◇ **anaf g. diwar flistr, flistranaf g.** Darallad speur ar galon pe un dalmerenn e poent enorc'h ur red gwad strizh ha kreñv o strinkañ dre un igorenn enkaet (aortek pe skeventel) pe skort (mintrek).

jet-lag ◇ **jet lag** ◇ **nijlank g.** Dianlenadoù (anhun, strafuilhoù an defroù hag ar realezh, asikted) an dislank amzerel da heul an nijadennoù hir treuzhedredennel (sl. *chronodépendance, chronosusceptibilité, mélatonine*).

jeûne : épreuve de ~ ◇ **prolonged fast** ◇ **prouad g. ar yuniñ** Prouad gevennañ an insulinvorc'hañ, anezhañ hanren yuniñ rik gant kemerad dour reol, war-benn lakaat war wel ur glukozwadisvec'h naouedel.

Job : syndromes de ~ ◇ **Job's syndromes** ◇ **azoniadoù Job** (Anvad kinniget a-zave da stad vantrus an dudenn viblek) 1 Kevreted azoniad Zollinger-Ellison (angreizhoù koazhadel niverus hag adfeilhus, usteñ gwagrennoù ha glauorgenn ar c'hreuz o tec'han usvorc'h hag ustrenkegezh, yoc'hennou an ilgreiz h.a.) gant un adenomatoz enborc'hadel liessez (gougorfenn, arskoedenn); al laurioù grizias ha kilvers diwasket gant ar glañvourion o deus talvezet e anv d'ar c'hleñved. 2 Fallezh o tizhout ur bugel, devoudet gant linadurioù yen liessez hag adfeilhus diwar stafilokok, kevret gant un ekzema henek, ur c'hroc'hen islivegadak ha blev rous; da arbenn e c'houlakaer un negez hangaeel e raklen ezreolder ar granulokit neutrofil, iskimidrevnek, berr ganto ar borc'hañ enzimoù lizozomel hag histamin.

Jolly : corps de ~ ◇ **Jolly's bodies** ◇ **korfoù Jolly** Greunanoù bazofil bezant en hemati 'zo da geñver amwadoù grevus pe goude ar felc'hezvenañ; aspadennoù diwar ar graoñell e ve anezho.

jonction atrioventriculaire ◇ **atrioventricular junction** ◇ **kevre g. kentezkofig** Trevnad o c'hoarvezout eus ar c'hlohm kentez-kofig hag eus kef an hordenn gentez-kofig (sl. *tachycardie jonctionnelle*).

jonction pyélo-urétérale : syndrome de la ~ ◇ **pelviureteric junction obstruction** ◇ **azoniad steviadur ar geforzh lestr-sandroazh** Skoilh ouzh diver an troazh dre benn ezreolder ganedigel difourk lestr al lounezh er san droazh, o tevoudañ ul lounezhfoeñv, hemañ o chom enklat pell amzer, en ervez avat da rouestlañ dre ur poread pe ur c'hrouanegezh.

jonction : complexe de ~ ◇ **junctional complex** ◇ **kemplezh b. juntele** Trevnad loet e blein kern ar c'helligoù epitelet ouzh o endlidañ hag o stankañ an esaou etrezo, anezhañ teir reizhiad juntañ : adalek ribl rez ar gellig betek an donder : ar *zonula occludens*, ar *zonula adherens* hag ar *macula adherens*.

jonction(-)

- *canal assurant la jonction entre un canalicule biliaire et un canal périlobulaire* kanol o keneren ur ganolig vestl hag ur ganol etre-flipezhennoù
- *capillaires de jonction* korrwazhied skoeviñ
- *jonction du bassin et de l'uretère* pe
- *pyélo-urétérale* keforzh lestr-sandroazh
- *jonction du tronc et du bras* rann eren ar vrec'h ouzh ar c'hef
- *jonction neuromusculaire* juntad nervenn-kaher
- *jonction sino-atriale* pe
- *sino-auriculaire* kevre god-kentez
- *la jonction du bras et de l'épaule* kevre ar vrec'h ouzh ar skoaz
- *tachycardie jonctionnelle* kalonustead kevrel.

Jones : critères de ~ ◇ **Jones criteria** ◇ **dezverkoù l. (g.) Jones** (dezverkoù savelet gant T. Jones e 1942, azveret gant an *American Heart Association* e 1965) elfennoù eus deznaouiñ kleñved Bouillaud (hini anezho n'eo spesadel), renket etre *dezverkoù muiek* : liesarzfo, kalonfo, eritem gwalennek (Gl. *érythème annulaire* pe *marginé*), korea Sydenham, ozvennoù Meynet, ha *dezverkoù leiek* : terzhienn, arzostoù, uspad arroud PR ar c'halonvarrezad, yaegezh prouadoù bevoniell an danienn, usvec'h an antistreptolizinoù O, diagentoù personel remm lemm an arzoù ; dodet e vez an deznaou pa stader pe 2 *d.* muiek da nebeutañ, pe 1 *d.* muiek ha 2 *d.* leiek (sl. *Bouillaud : maladie de ~, cardiopathie rhumatismale*).

Jones : fracture de ~ ◇ **Jones fracture** ◇ **torr g. Jones** Torr dre zigrakañ diaz pempet askorn ar c'hreiztroad.

joue ◇ **cheek** ◇ **boc'h b. (d. : divvoc'h) [PNA & TA bucca]** Lodenn gostez an dremm, bevenn diavaez kavenn ar genoù, enni kigennoù (*k.* drompilher, *k.* a-voc'h, h.a.).

NOTENN : Endra ergemenne an destladur PNA an anvadoù e *bucca* ha *mala*, ez erskriv an destladur TA an termen *bucca* nemetken ; heñvel dra, e kinnigan erlec'hiañ : *boc'h b. (d. : divvoc'h)* ouzh : *gen b. (d. : divc'hen)* (*boc'h b. (d. : divvoc'h)*) evel ma lenner e Geriadur ar Gorfadurezh, *Preder 1999*.

joule ◇ **joule** ◇ **joul g. -où** Unanenn gremm, labour, gwrezad, luc'had (holl ventadoù dezho an un atalad mentawouriel ML₂T₋₂), ur joul o vezañ al labour dec'hanet gant un nerzh 1 newton o tilec'hiañ e boent krog war ur metr diouzh e roud dezhañ ; bet degemeret e ser an *International System of Units* (1960), ez eo par ar joul, ekeñver an unanennoù kent, da 0,239 kalori ha da 10⁷ erg (sl. *calorie*).

journal : signe du ~, signe de Froment, signe du pouce ◇ **Froment's paper sign** ◇ **arouez b. ar gazetenn** Diaester evit kemer ur follenn baper etre ar meud hag ar biz yod dre benn gouzeizi kigenn nesaer ar meud pa vez tizhet an nervenn a-helmo.

judgement : troubles du ~ ◇ **disturbance of judgement** ◇ **daralladoù an ervredañ** *Ervredañ* a reer eus an ober kefredel kempleshañ, rekis evit emazasaat ouzh ar plegennoù, oc'h amplegañ poell, evezh, dassell, skiant ar werc'helezh, gouested da zeprannañ an unan hag an amgen ; en arvar e vez an ervredañ gant *a)* an dilerc'hegezh kefredel, *b)* an disleberadur kozhiadel, *c)* an drozvezegezh (ar "speredoù faos"), *d)* ar psikoziou (paranoia pergen) ha, dre vras, an ambrennoù ha direizhoù an neuzid.

jumeaux ◇ **twins** ◇ **gevelled l. (g.)** Koublad ganet dre an un gwilioud, evodet pe eus daou vi (*g. daouviel*, Gl. *j. biovulaires*), dezho gladoù hilel kevarall, pe eus an un vi (*g. unviel*, Gl. *j. uniovulaire*), dezho an un glad hilel (sl. *dizygote, monozygote*)

K

K : **complexe** ~ ◇ **K complex** ◇ **kemplezh** b. **K** Arvez eus an empennvarrewezañ naouus dre ur wagenn c'horrek dastroc'het gant luskelladoù herrek, a stader e-kerz ar c'housk, ar c'homa, an hunwezhiñ evel respont d'ur fraouaat skiantennel.

Kabat : **méthode de** ~ ◇ **Kabat's method** ◇ **hentenn Kabat** Kalvezder addiorren o korvoñ an herouezañ nerygaherel anunfraouadel.

kaburé ◇ **kabure** ◇ **kabure** g. Dispuilhad linadellek dibad o tarvezout d'an ampoent ma vez trebarzhet ar c'hroc'hen gant kerker *Schizostoma japonicum* (sl. *cercaires*).

Kahler : **maladie de** ~, **myélomes multiples** ◇ **Kahler's disease** ◇ **kleñved Kahler** Gwadnaoued yud diwar ur c'hlon limfoïdel B o tec'han neridigezh plasmokit monoklonel er mel eskern, tizhet gantañ ar wazed goude 50 vloaz, erzerc'hat dre yoc'hennoù niverus dinodet diaser e-barzh mel an eskern, dreist holl el livenn hag en eskern plat, o tevoudañ laurioù ha torroù emdarzh, kresk muiiek tizh gouzediñ an hemati, alies skorted al lounezh hag un amwad grevus; darvezout a ra ar marv dindan 2 pe 3 bloaz (sl. *dysglobulinémie, immunoglobuline*).

kala-azar, leishmaniose viscérale, fièvre doum-doum, fièvre épidémique d'Assam, maladie de Sahib, ponos ◇ **kala-azar, Leishman's anaemia, visceral leishmaniasis, dumdum fever, death fever, tropical spleno-megaly, ponos** ◇ **kala-azar** g., **terzhienn doumdoum, leichmaniaz** g. **flugezel, felc'husvent** g. **trovanel, ponoz** g. Kleñved broereuziadek en India hag er Reter Pellañ war emastenn en Diazad morkreisel, naouus dre un derzhienn direoliek, un avufelc'husvent, ul livrezh staenek a 'r c'hroc'hen, un amvad gant tuginad ar gwennrestrad, un azoniad dizenterek alies hag, a-wechoù, nozeleannoù kroc'hen; ent emdarzh, e tedro d'ar marv dindan un nebeut mizioù, daou vloaz d'ar muiañ; kiriek dezhañ eo *Leishmania donovani*, protozoenn a gaver o paoteriñ er felc'h hag e mel an eskern; hervez ar broezioù e vez ar mirvaou anezhi ar c'hriagnered, ar chas, al lern hag an denion o unan, an trezouger o vezañ *Phlebotomus argentipes*; prederiet e vez dre an halioù stibiom hag ur foueastaler, an amfoterikin B.

kala-azar infantile, anémie splénique infectieuse, pseudoleucémie infantile infectieuse ◇ **infantile kala-azar, Méditerranéan kala-azar** ◇ **kala-azar bugelel, amwad felc'hel ar vugale, gaouleukemiezh** b. **poreel ar vugale** Furm kala-azar diwar *Leishmania infantum*, seurtad eus *L. donovani*, skignek en Armenia, en Turkestan hag en Diazad morkreisel, naouus dre un derzhienn gammigellek, un amwad muiiek, ment vras ar felc'h hag ar c'hof, ur fallezh hag un dedro marvus dindan 6 miz.

kalicytie ◇ **intracellular potassium rate, kalicytia** ◇ **kelligvec'h** g. **kaliom, kaliomgelligvec'h** g. Feur ar c'haliom er c'helligoù, reol etre 4,6 ha 6,60 g (etre 115 ha 160 mmol) dre litr dour enkelligel.

kaliémie ◇ **kaliaemia** ◇ **gwadvec'h** g. **kaliom, kaliomwadvec'h** g. Feur kaliom e plasma ar gwad, reol etre 0,18 ha 0,20 g (etre 4,5 ha 5 mmol) dre litr.

kaliopénie ◇ **kaliopenia** ◇ **olkaliom** g. Feur kaliom re izel e dourennoù ar bevedeg.

kalisme ◇ **kaliegezh** b. Teskad an darvoudoù pistriel devoudet gant ar c'haliom : strafuilhoù kreuzel, kalonistead, fallezh alkaliel.

kaliothérapie ◇ ◇ **kaliomgurañ** Arver yac'hadel ar c'haliom.

kaliurèse ◇ **kaliuresis** ◇ **troazhvorc'hañ kaliom, kaliomdroazhvorc'h** g. Degorzhañ ar c'haliom dre an troazh.

kaliurie ◇ **kaliuria** ◇ **troazhvec'h** g. **kaliom, kaliomdroazhvec'h** g. Feur kaliom en troazh, reol etre 1 ha 5 g (etre 25 ha 128 mmol) dre 24 h.

kallicroéine ou **kallikréine** ◇ **kallikrein** ◇ **kallikrein** g. Enzim polipeptidek bezant en ilgreiz, er gwagrennoù halviñ ha c'hwezparañ, e plasma ar gwad hag en troazh, o tisoc'h eus blivaat un diaraoger anniñvek, ar *c'hallikreinogen*; en ilgreizfo lemm gwadliñvus, e tinod ar *k.* dre wered an tripsin hag e tilaosk daou bolipeptid all gwazhiedfrankaer ha iswaskeiat eveltañ, ar c'hallidin hag ar bradikinin, kiriek d'ar bleuz; heuder ar *k.* zo ivez ezniñver an tripsin, ar c'himotripsin hag ar fibrinolizin (sl. *bradykinine, fibrinolyisine, kinine*).

kaolin ◇ **kaolin** ◇ **kaolin** g. -où Silikat aluminiom दौरgediet, seurtad argila e rezh ur poultr gwenn andileizh en dour, danvezet el liaerezh evel anroad ar ganol vezhur.

Karman : **méthode de** ~ ◇ **Karman's procedure** ◇ **treugenn b. Karman** Araezad sioc'haniñ dre suc'hañ endalc'had ar grozh.

Karnofsky : **critères ou échelle ou index de** ~ ◇ **Karnofsky's (performance) index or scale** ◇ **skeuliad b. digonadoù Karnofsky** Skeuliad notennoù o tiskenn a 10 da 100 da 0, arveret da andalañ stad hollek, digonadoù hag erbedad gouzviaded ar c'heñvedoù henek grevus (kankroù pergen); isrannet e 3 rummenn :

a) perzhiusted er gedvuhez :

- 100, reol
- 90, oberiezh reol, un nebeut azonoù
- 80, digresk leiek an oberiezh.

b) dic'housted, kenderc'hel a ra da vevañ en e gêr :

- 70, ne c'hell ket labourat, nemet e chom diamzalc'h
- 60, o rekizañ bezañ harpet e plegennoù 'zo
- 50, ne c'hell ket bevañ hep ur gwarded ha prederioù mezegel muiek.

c) nammed, ne c'hell ket chom ken en e gêr :

- 40, ezhomm prederiadurioù bras
- 30, a rank bezañ klañvdiat
- 20, klañvour bras
- 10, toc'hor
- 0, marv.

Kartagener : **syndrome de** ~ ◇ **Kartagener's triad** ◇ **azoniad Kartagener** Azoniad dibaot naouus dre an driadezh : tuginad ar flugez, polipoz ar fri gant poreadur henek ar fric'hargadenn, bronkezusvoll (sl. *cils* : **syndrome des** ~ *immobiles*).

katal ◇ **katal** ◇ **katal g.** Unanenn ar reizhiad SI, muzul an treluskañ (arouez : *kat*), kementad enzim ret evit treuzfurmiñ 1 mol dindadan en 1 s.

Kaufman : **syndrome de** ~, **syndrome oculocérébrofacial** ◇ **Kaufman's syndrome** ◇ **azoniad Kaufman, aziadiad lagad-empenn-dremm** Teskad kammneuziadoù treuzkaset er mod aotozomek enkilek, o kevrediñ korregezh kloppenn, gaved, kornsae, isstiwel ha loakrevezh, dilerc'hegezh kefredel don.

Kawasaki : **syndrome de** ~, **syndrome adénocutanéomqueux** ◇ **Kawasaki's disease, mucocutaneous lymph node syndrome** ◇ **azoniad Kawasaki, aziadiad gwerblenn-kroc'hen-glourgenn** Klañvadur ar bugel yaouank, naouus dre un derzhienn uhel ha direoliek, un dispuilhad skarlegvanek, enantem ha darwazh ar gevresae, c'harwrenn c'houzoug, koeñvadur palv-sol hag alies tizhadur ar galon, gant un dedro grevus a-wechoù, ar marv o tarvezout e 2 pe 3 % eus an degouezhioù diwar dromboz un dalmerenn pe darvoll an aortenn pe ur garotidenn; ha da azonoù an anaez bezañ nes da re ar gwazhiedfo marvenn, e chom dianav e arbenn.

Kayser-Fleischer : **cercle de** ~ ◇ **Kayser-Fleischer ring, pericorneal ring** ◇ **trogornsaeenn Kayser-Fleischer** Gwalenn staenek loet war gwrinn ar gornsae, unan eus arouezioù arstalekañ kleñved Wilson (avufo familhel ar yaouerion) hag aziadiad Westphal-Strümpel (sl. *dégénérescence hépatolenticulaire, hépatite fami-liale juvénile avec dégénérescence du corps strié*).

Kearns et Sayre : **syndrome de** ~ ◇ **Kearns-Sayre syndrome** ◇ **azoniad Kearns-Sayre** Kevredet luc'hsaefo livegennek, lagadseizi diavaez, malvennislink, ezwariañ, kahernaoued kalon gant mireoù (tolc'had barr, tolc'had kentez-kofig); ouzhpenn, alies, bouzarded, aziadiad ilpennel, strafuilhoù enborc'hadel ha savder bihan; anaez e dianlen un delead eus an DNA mitokondriel.

Keith-Wagener : **classification du fond d'œil selon** ~ ◇ **Keith-Wagener-Parker classification of retinal changes** ◇ **rummadur g. Keith-Wagener-Parker daralladoù an deun lagad** Skeuliad anafoù an deun lagad hervez argresk grevusted an uswask talmerel : *pazenn I* : arvez kouevrek ar gwazhied; *pazenn II* : arouez ar c'hroaziañ; *pazenn III* : gwadliñvoù ha naouezennoù; *arouez IV* : gouliñv ar vegenn (sl. *croisement* : *signe du* ~).

kelotomie ◇ **kelotomy** ◇ **tagellenbenañ** Skejañ an nask o skoulmañ an avelenn tagellet.

kelvin ◇ **kelvin** ◇ **kelvin g.** Unanenn diazez ar gwrezverk er reizhiad etrevroadel ar Wreznerzhoniezh; ur c'helvin (1 K) zo par d'un derez Celsius (1°C), nemet e loc'h ar skeuliad kelvin diwar ar mann dizave (0 K); alese, 273,16 K eo teuzverk ar skorn ha 373,16 K eo bervverk an dour.

Kennedy : **syndrome de** ~ ◇ **Kennedy's syndrome** ◇ **azoniad Kennedy** Azoniad hêrezhel dibaot treuzkaset er mod enkilek, ereet ouz ar c'hromozom X, o kevrediñ : 1) un isteñv kaherel argammedek nervien hirvellivenn, erzerc'h gant an oadour gourev dre wander ar c'higennoù nezek, un isteñv teodel gant duilhenneghadou, andamoug ha krenevezh, 2) ur venevvronegezh hag a-wechoù un diabet; dindan gevarguz emañ kerentiezh an anaez-mañ gant aziadiad Kugelberg-Welander.

Kennedy : **syndrome de Foster** ~ ◇ **Foster Kennedy's syndrome** ◇ **azoniad Foster Kennedy** Azoniad lagadel naouus dre isteñv nervenn ar gweled kentaal diouzh un tu ha dre zassav er vegenn diouzh an tu all, kiriek dezhañ peurliesañ ur yoc'henn e rannbarzh tal an empenn, a-gendu gant an isteñv gweledel.

Kenny-Caffey : **syndrome de** ~ ◇ **Kenny-Caffey syndrome** ◇ **azoniad Kenny-Caffey** Kleñved eskern hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, erzerc'h diwar ar c'hanedigezh dre an ispouez ha, da c'houde, dre ur gorrdeheneuz, glizi, kalkiom-

wadisvec'h ha fosfatwadisvec'h; dale a vez gant serridigezh ar feunteunig araok, tevaat a ra an eskern, ar volzpenn ha kaennenn an eskern hir pergen, dre benn un hiperostoz o tordreñ betek barrañ kavenn ar mel.

Kérandel : *signe de ~*, *signe de la clé* ◇ **Kérandel's sign** ◇ **arouez b. Kerandel, arouez an alc'houez** Uc'heraez ar gwiaodoù don; da skouer, e sav laur kriz er voz pa droer an alc'houez en ur botailh; an arouez eo eus derou an tripanosomiaz denel pe gleñved ar c'houk.

kéralalgie ◇ **keratalgia** ◇ **korsaeost b.** Laur o saezhenniñ diwar ar gornsaes.

kératectasie ◇ **keratectasia** ◇ **usled g. ar gornsaes, korsaeüsled g.** Frankaat kleñvedel ha moanaat ar gornsaes.

kératectomie ◇ **keratectomy** ◇ **korsaeezvenañ** Gouvenañ (surjaniel pe laserel) ul lodenn eus ar gornsaes.

kératine ◇ **keratin** ◇ **keratin g.** Skleroprotein bezant er faner.

kératinisation ◇ **keratinization** ◇ **keratinaat, keratinadur** Treuzfurmatur haenoù gorre ar c'hroc'hen pe ur glaourgenn dre ensiladur keratin enno.

kélatinocytes ◇ **keratinocytes** ◇ **keratinokit s.** Kelligoù a 'n epiderm o parañ keratin.

kératite ◇ **keratitis** ◇ **korsaeo g.** Tanijenn ar gornsaes, naouus dre ruzder ar gevresaes, laur kriz, daeraouiñ, gwilc'hañ, luc'h-gaz; enberadur ur c'hollir dre fluoreskein a laka war wel un darallad eus epitelienn ar gornsaes; a orin bakteriel, viruzel, foueel pe allergek e c'hell bezañ ar gornsaeso.

kératite filamenteuse ou fibrillaire ◇ **filamentous keratitis** ◇ **korsaeo edañvennek** Anaes ar gornsaes naouus dre amdeñvennoù hir ha tanav a orin epiteel, heñvel ouzh neudenoù sidan war stegn o tispakañ herrek hag arreat war he gorre.

kératite herpétique ◇ **herpetic keratitis** ◇ **korsaeo erorel** Error ar gornsaes.

kératite à hypopion, ulcus serpens ◇ **hypopyon keratitis, serpiginous ulcer** ◇ **korsaeo gant hipopion, angreizh b. aremstlej** Seurtad korsaeo poreel naouus dre ur gouliezad aremstlej a 'r gornsaes, kevret alies gant bezañs lin er gambr araok; ar pneumokok e ve ar gwezher.

kératite neuroparalytique ◇ **neuroparalytic keratitis** ◇ **korsaeo diwar seizi** Mideñv ar gornsaes a-geñver gant un aneraez diwar anaf an nervenn drigevell, naouus ent klinikel dre un derou manguñ hag un dedro grevus etrezek an demeraat hag an dreloezañ, a-wechoù betek linleñ al lagad; darvezout a ra peurliesañ da heul ur senkl lagadel pe ur c'hornsaeso erorel, ur pistriadur dre an arsenik pe an trikloretilen, un tizhad a 'r gangrenn drigevellet amwasket gant ur yoc'henn empenn, pe ur skejad surjaniel pe daraezel a 'n nervenn.

kératite ponctuée ◇ **keratitis punctata** ◇ **korsaeo dluzhet** Tanijenn haen donañ ar gornsaes e rezh ur strewad brizhennoù bihan, kevret hogos bepred gant un envezfo levrus hag un uswask lagadel.

kératite ulcéreuse ◇ **ulcerative keratitis** ◇ **korsaeo gouliezek** Gouliez ar gornsaes, poreel hogos bepred.

kératooanthome ◇ **keratoacanthoma** ◇ **keratoakantom g.** Yoc'henn epiteel kuñv epiteliomvanek o c'hoarvezout eus un nozelenn arrott keratozek en he c'hreiz, oc'h argizañ he unan; tizhout a ra ar wazed goude 50 vloaz; dianav e chom an arbenn anezhi.

kératocèle, descemétocèle ◇ **keratocele** ◇ **deskemetogad g.** Balirad al lavnenn vevennus adreñv (kennenn Descemet) a-dreuz un treloezad er gornsaes (sl. *Descemet : membrane de —, descemétocèle*).

kératocône, cornée conique ◇ **keratoconus** ◇ **korsaeo gernek** Migrommder ar gornsaes e stumm un dorgenn, disneuziad kevret gant un isstiwel muiek hag a-wechoù un amstiwel hag ul liesgwel.

kératocconjunctivite épidémique ◇ **epidemic keratoconjunctivitis** ◇ **kornkevresaeo g. darreuziadek** Kevresaeo poreel ha tredizhus diwar un adenoviruz; en ur prantad kentañ e stader ur poreadur bolc'hennel gant brizhliennoù hag a-wechoù envezfo; da c'houde e vez tizhet ar gornsaes gant un danijenn laurus hag un dluzhadur demerennoù; parañ a ra hep arlenadoù.

kératodermie palmoplantaire ◇ **keratosis palmaris et plantaris** ◇ **keratoderma g. palv-sol, keratoz g. palv-sol** Dermatoz gwech hêrezhel, gwech arzeuat hag eilvedel d'ur pore (sifiliz), d'ur pistriadur (arsenik), d'un anaes kroc'hen all, pe kentael (akrokeratom), naouus dre devadur kornaen ar palvoù hag ar solioù.

kératoglobe ◇ **keratoglobus** ◇ **korsaeo volzek** Dardenn ar gornsaes, houmañ o vont hantervoulek hag a-wechoù ken balirek ma n'eo mui ar malvennoù evit klozañ, arvez eus ar bulagad alies, kevret gant ur wanidigezh herrek eus ar gweled (sl. *buphtalmie*).

kératolyse ◇ **keratolysis** ◇ **1 kornhaenloezañ 2 keratoliz g.** 1 Dispenn kornhaen an epiderm dre zileizhañ ar c'heratin diwarbouez danvezzennoù kimiek arveret er Groc'henouriezh evel an drenkenn retinoek (Gl. *acide rétinolique*) en un amkan yac'hadel. 2 Dispegadur an epiderm ha gourc'hennadur puilh a stader a-wechoù gant an nevezc'hanidi.

kératolytique ◇ **keratolytic** ◇ **1 kornhaenloezer aa. 2 kornhaenloezer g. -ioù** 1 En araez da zileizhañ ar c'heratin. 2 Danvezenn gornhaenloezer.

kératomalacie ◇ **keratomalacia** ◇ **korsaeovlodad g.** Korsaeo don diwar an anvitaminegezh A o tizhout an nevezc'hanidi atrepsek, naouus dre grinded ar gevresaes (kseroz), heuliet gant un ensiladur louet a 'r gornsaes en ervez da c'houliezañ ha da dreloezañ mar trebad an negez vitamin A (sl. *athrepsie*).

kératome ◇ **keratoma** ◇ **keratom g.** Yoc'henn gornin ar c'hroc'hen (sl. *corne cutanée*).

- kératome malin diffus congénital, ichtyose fœtale, fœtus arlequin** ◇ **keratoma malignum congenitale** ◇ **keratom yud hollek ganedigel, iktioz g. ar grouell, krouell b. harlikin** Kleñved hêrezhel enkilek, dermatoz anadet d'ar c'hanedigezh, naouus dre un hiperkeratoz hollek oc'h amparañ ur grogen dev, kalet, skarillet, o c'hronnañ ar c'horf abezh, o stankañ an igorennoù, o herzel a fiñval, a zenañ pergen, o kas herrek d'ar marv gant an disvezhur, an angwent pe ar poreadur (sl. *ichtyose*).
- kératomégalie** ◇ **megalocornea** ◇ **keurgornsaegez** b. Ment reñverek ar gornsae, desellet a-wechoù evel ur furm a vulagad.
- kératométrie** ◇ **keratometry** ◇ **kornsaeventañ, kornsaeventerezh g.** Muzuliañ skin krommder ar gornsae diwar-bouez ur c'hornsaeventer.
- kératomycose** ◇ **keratomycosis** ◇ **keratomikoz g.** Mikoz ar gornsae, kiriek dezhañ *Aspergillus fumigatus*, naouus dre un angreizh loet e kreiz ar gornsae, o lezel ul leukom bras pe vrasoc'h war e lerc'h.
- kératonyxis** ◇ **keratonyxis** ◇ **kornsawanañ, keratoniksiz b.** Ezwanañ ar gornsae, kentañ lankad oberatadenn ar ferennlug.
- kératopathie** ◇ **keratopathy** ◇ **kornsaead b.** Nep anaez eus ar gornsae; ar boaz eo avat derc'hel an anvad-mañ war an anaeziou anfoel hag e enebiñ ouzh ar c'hornsaefoioù.
- kératoplastie, greffe cornéenne** ◇ **keratoplasty** ◇ **kornsaeatelviñ, imboudañ kornsaeel** Erlec'hiañ ouzh un tammad kornsae anafek, aet demer, un tammad kornsae bonan gorreet diwar ar gouzviad e unan pe a orin all; *k. lavnnel* (Gl. *k. lamellaire*) pa reer un imboud gorre, *k. trebarzhiñ* (Gl. *k. transfixiante*) pa zigorer ar gamb araok evit amsaviñ un takad klok eus ar gornsae.
- kératoplastique** ◇ **keratoplastic** ◇ **1 keratinasparus aa. 2 keratinasparer g. -ioù** 1 O vliavaat keratinadur ar c'helligoù epitel. 2 Gwezher yac'hadel keratin-asparus (diounezet ouzh an ekzema).
- kératoscopie** ◇ **keratoscopy** ◇ **kornsaeelliñ, kornsaeellerezh g.** Teskad ar c'halvezderioù arveret evit imbourc'hiñ ar gornsae.
- kératose, kératodermie** ◇ **keratosis** ◇ **keratoz g.** Anaf ar c'hroc'hen naouus dre usteñv muiek kornhaen an ezkroc'hen, kevret pe get gant usteñv begennoù an derm (sl. *kératodermie palmoplantaire*).
- kératose pilaire, ichtyose ansérine, lichen pilaire** ◇ **keratosis pilaris** ◇ **keratoz bleval, iktioz g. houpigek, liken g. bleval** Dermatoz naouus dre grinded ar c'hroc'hen ha tosennoù bihan sec'h, kornin, gant pep a vlevenn skoanet en o c'hreiz, lec'hiet dibarek war barzh adreñv ar vrec'h, talbenn diavaez ar vorzhed ma vez kevret gant ruzder hag isteñv an amwiskadoù.
- kératose pseudotumorale de Poth, hyperplasie pseudoépithéliomateuse du dos des mains** ◇ **Poth's tumour-like keratosis** ◇ **keratoz hanwevanek Poth, uswe epiteliomvanek ar c'hildornioù** Anaf arrott, gwenaennek, o tarvezout gant an dud oadet war o farzhioù dizolo (arvrec'hioù, kildornioù), en ervez un diec'henezhañ kankrek.
- kératose séborrhéique** ◇ **seborrheic keratosis** ◇ **keratoz soavredel** Anaf kuñv an ezkroc'hen, o c'hoarvezout eus un dosenn azgell goleet gant un usweed e rezh ul lindrad gourc'hennus tev.
- kératose sénile, kératose actinique, kératose solaire, crasse des vieillards** ◇ **keratosis senilis, actinic keratosis** ◇ **keratoz kozhiadel, kramenn ar re gozh** Anaf kroc'hen a 'r parzhioù dizolo an henaded, rouestlad da isteñv kozhiadel a 'r c'hroc'hen, o c'hoarvezout a vrizhennoù azgell sec'h ha garv a-wechoù, sterniet er c'hroc'hen, goleet tamm ha tamm gant ur furmadur kornin o valirañ, ar *heratom kozhiadel*, o vont a-wechoù betek amparañ ur c'horn kroc'hen (sl. *corne cutanée*).
- kératonomie** ◇ **keratotomy** ◇ **kornsaeenbenañ** Skejañ ar gornsae; ar *k. emprennek* (Gl. *k. radiaire*), anezhañ ober eus 6 da 8 flañchadenn hervez kelc'hskinoù ar gornsae, oa amkanet da zereizhañ an isstiwel (oberatadenn dilezet).
- kéronaupathologie** ◇ **keraunopathology** ◇ **kurunanaezouriezh** Studi an anaeziou devoudet gant ar foeltr.
- kérior, teigne suppurative** ◇ **kerion** ◇ **kerion g., tagn g. lineiat** Trikofitiez ar briger hag ar barv e rezh plakadoù arrott ha balirek o tilaoskiñ lin dre igorennoù ar bolc'hennou bleval, o tedreñv betek distruj ar bolc'hennou hag an diwaoutad.
- kérithérapie** ◇ **kerithery** ◇ **koagurañ** Arver yac'hadel ar parafinoù evit farlokañ parzhioù eus ar c'horf hag o derc'hel eurvezhioù pad en ur gwrezverk uhel (remm) (sl. *enveloppement*).
- Kerley : lignes de ~** ◇ **Kerley's lines** ◇ **linennoù Kerley** Demerennoù linennek tanav bezant war ar skinlunioù skevent, a rummer etre 4 rizh : al *I. A*, o saezhenniñ diouzh begel ar skeventenn, al *I. B*, a-zremm, lec'hiet en aspleg kostoù-kelc'hspereunn, al *I. C*, e stumm rouedadoù, al *I. D*, tevoc'h ha hiroc'h, o sezañ er rannbarzh arak-krec'h; al *I. B* a stader er c'hleñvedoù kalon (uswask talmerel skevent), e lec'hiaurioù skevent ar retikuloz, ar c'hankroù, al leukemiezh, ar sarkoidoz, ar silikoz; erzerc'haat a reont goulfiñ, euflegezh pe razekaat an tilhennoù etre-flipezennoù.
- Kernig : signe de ~** ◇ **Kernig's sign** ◇ **arouez b. Kernig** Dic'halluster da beurastenn ar c'har pa vezer azezet, oc'h erzerc'haat ar pilhonfo empenn-livenn.
- kérose** ◇ **kerosis** ◇ **keroz g.** Usvoll ar savnigoù a stader alies er soavred.
- kétansérine** ◇ **ketanserin** ◇ **ketanserin g.** Heuder spesadel buzerion ar serotonin a rizh 5HT2, gwazhiedfrankaer an talmerennigoù hag enebuswaskeg.
- kétolides** ◇ **ketolides** ◇ **ketolidoù, -eier l. (u. : ketolid g.)** Kerentiad bevastalerioù nes d'ar makrolideier, deveradoù damgevanaoz an eritromikin; ar penn stell anezho, an telitromikin, zo gwezhus ouzh ar c'hok Gram + kiriek da boreadoù analadel.
- Kienböck : maladie de ~** ◇ **Kienböck's disease** ◇ **kleñved Kienböck** Askornvarvenn anlestek diandaraez al loareg (Gl. *semi-lunaire*) o tizhout an dud yaouank, naouus, *ent klinikel*, dre laurioù en arzorn, *ent skinourel*, dre un arvez direoliek ha douesaet an askorn; unan eus he arbennoù eo al labour gant benvegijinnoù (horzhataer) (sl. *maladie de Köhler*).

Kienböck : **phénomène de** ~ ◇ **Kienböck's phenomenon** ◇ **anadenn b. Kienböck** Anadenn stadet war ar skramm skinselliñ oc'h erzerc'haat seizi untu ar gelañ hspurenn (meginezvenañ, fennad douraezhel er c'hrezoù) : e-doug an enanalañ e tiskenn ar gelañ hspurenn en tu bonan hag e sav en tu klañv.

Kikuchi : **maladie de** ~ ◇ **necrotizing lymphadenitis** ◇ **kleñved Kikuchi, gwerblennfo g. marvennus** Anaes dibaot, naouus dre werblennfo gouzoug ha terzhienn gant ar vaouez yaouank ; ent wiadoniell e stader bepred ur marvennad gant un ensiladur histiokit ; dianav eo an azeb ; un orin hangaeal a gevarguzer.

Killian : **polype de** ~ ◇ **choanal polyp, nasal polyp** ◇ **polip g. Killian, polip ar founilhòu** Polip foel kuñv evodet diouzh kev ar garvan etrezek kavenn ar fri, ouzh he steviañ a-wechoù.

Kimmelstiel et Wilson : **syndrome de** ~ ◇ **Kimmelstiel-Wilson syndrome** ◇ **azoniad Kimmelstiel-Wilson** Anaes o tarvezout alies gant an diabetieon, anezhañ, *ent neuziadurel*, tevadur diazkennenn korrwazhied ar bloueigoù hag a-wechoù an tuellennoù, an treuzfurmadur e hialin eus an danvezenn treuznaouezet etre kizennoù ar bloueigoù ; *ent klinikel*, troazhpoteinegezh, skorted lounezh argreskus gant uswask talmerel, dedro herrek etrezek ar marv.

kinase ◇ **kinase** ◇ **kinaz g.** 1 Enzim o treluskañ paridigezh un enzim all diwar an diaraoger anezhañ, sk. : an enterokinaz ilgreizel oc'h ober d'an tripsinogen treiñ e tripsin. 2 Enzim o tezougen ar bonad fosfat adalek an nukleozidoù-trifosfat, adalek an drenkenn adozin-trifosforek peurliesañ.

kinébalnéothérapie ◇ **kinebalneotherapy** ◇ **kouronkleuñvouriezh** Mod embreger al Leuñvouriezh amkanet da aesaat an diorren dre ren ar pleustradoù e-barzh an dour en ur gibell pe en ur gouronkell.

kinésithérapeute ◇ **kinesipathist** ◇ **leuñvour g. -ion** Eiler mezegel oc'h embreger al leuñvouriezh.

kinésithérapie ◇ **kinesitherapy** ◇ **Leuñvouriezh b.** Diskiblezh lezvezegel, he amkan addiorren an arc'hwelioù en domani kigennarzel dre c'houlankañ fiñvoù oberiat pe gouzañvat : merata, defañval, kefleuñviñ, gimnastik, treloc'hyac'haat, h.a.

kinine ◇ **kinine** ◇ **kinin g.** Anvad rumm polipeptidoù 'zo dilaosket e plasma ar gwad diwar ur globulin enaozet en avu, ar *c'hininogen*, dindan wered ar c'hallikrein ; distrujet e vezont a-benn un nebeut eilennoù dre ar c'hininaz H (enzim amdreiñ) ; ober a reont d'ar c'higennoù levn argrezañ, d'an talmerennoù frankaat, d'ar c'horrwazhied heforsaat ha d'al leukokit emdizhañ, devoudañ un iswask hag ul laur ; an daou ginin pennañ eo ar bradikinin hag ar c'hallidin (sl. *kalicrine, P : substance* ~).

NOTENN : Evezh ! Un heñvelskriv ez eus da Br. *kinin* a-dal da Gl.Sz. *quinine*, Al. *Chinin*.

Kinsbourne : **syndrome de** ~, **syndrome opso-myoclonique** ◇ **Kinsbourne's syndrome, dancing eyeball syndrome** ◇ **azoniad Kinsbourne, azoniad lavig g. al lagad** Empennaoued ar vugeliezh, dibaot a-raok 3 bloaz, da azonoù dezhañ kridoù krenerzh diarvennel, ankedre, nistagmuz ha fiñvoù antrevnek herrek an daoulagad (opsoklonuz).

Kirmisson : **signe de** ~ ◇ **Kirmisson's sign** ◇ **arouez b. Kirmisson** Bronduenn linennek a-dreuz e pleg an ilin a stader goude an torr eus penn izelañ ar paler hag an dilec'hiadur war raok eus an tamm uhelañ ; devoudet eo gant kreud haenoù donañ ar c'hroc'hen ouzh ribl lemm an askorn torret.

Kirschner : **méthode de** ~ ◇ **Kirschner's traction** ◇ **hentenn Kirschner, hentenn sachañ** Araezad diren ha disloc'hañ an torroù gant astenn kendalc'hek dre sachañ war an tamm pellek diwar-bouez ur ber metal (*ber Kirschner*) dodet adrebarzh dezhañ.

kit ◇ **kit** ◇ **rikoù l. & g.** Teskad an elfennoù ret da gas ur wezhiadenn da benn, sk. : *rikoù diurnat* (Gl. *kit de dépistage*).

Klapp : **méthode de** ~ ◇ **Klapp's method** ◇ **hentenn Klapp** Pleustradoù gimnastik amkanet da zereizhañ gwarioù al livenn, ar gouziviad o vezañ el loadur pevarzroadek, war e zaoulin, oc'h emharpañ pe get gant e zaouarn war al leur.

Klebsiella ◇ **Klebsiella** ◇ **Klebsiella** Genad bakteri, anezhañ bazhilli Gram — difiñv, gougevret ouzh kerentiad *Enterobacteriaceae*, gwezher da boreoù analadel, d'an difteriezh, h.a.

Kleihauer : **test de** ~ ◇ **Kleihauer's test** ◇ **prouad Kleihauer** Hentenn dinoiñ hemati ar grouell e-barzh gwad ar vamm, soliet war alkaliarzusted an hemoglobin krouellel.

Kleine-Levin : **syndrome de** ~ ◇ **Kleine-Levin syndrome** ◇ **azoniad Kleine-Levin** Azoniad dibaot dianav e arbenn a stader gant ar grennarded, naouus dre varroù ushin o padout etre devezhioù ha sizhunvezhoù, gournaon da geñver an dihunioù, mirealioù (darwantusted, reñver an avez revel).

kleptomane ◇ **kleptomaniac** ◇ **1 laervariat aa. 2 laervariat g. -ed** 1 Klañv gant al laervar. 2 Gouziviad al laervar.

kleptomanie ◇ **kleptomania** ◇ **laervar g.** Darlusk mac'hennek da laerezh, gwech diemouez, gwech emouez hag anglevet gant enkreuz.

Kleyne : **manœuvre de** ~ ◇ ◇ **embregad g. Kleyne** Dreistastenn ha dreiste'hwelañ ar penn o tevoudañ an nistagmuz pa vez skorted mellkein-diazpenn (sl. *insuffisance vertébrobasilaire*).

Klinefelter : **syndrome de** ~ ◇ **Klinefelter's syndrome** ◇ **azoniad Klinefelter** Benevvronegezh hag isvent a'r c'hlidennoù a stader gant gwazed yaouank bras ha moan, laban ha tizogvanek, kevret gant sperankellig diwar astal ar sperbarañ ha darallad an tuellennoù spergaser (sklerohialinoz) ; azoniad dec'hanez gant an dargemm etre ur fenotip gourevel hag ur rev c'henrizhel benevel dre benn ar vezañs eus 3 c'hromozom revel : XXY, dibaotoc'h 3 pe 4 c'hromozom X hag 1 pe 2 gromozom Y : azoniadoù XXXY, XXXXY, XXYY (sl. *aberration chromosomique, sexe nucléaire, trisomie*).

Klippel : maladie de ~ ◇ **Klippel's disease** ◇ **kleñved Klippel** Anaez a stader gant an dud oadet, naouus dre zedro herrek un envedi hag orc'hadoù gwazhiedel arreat o lezel seizioù war o lerc'h; ent neuziadurel, e stader un aterom e talmerennoù an empenn.

Klippel-Trenaunay : syndrome de ~, naevus variqueux ostéohypertro-piqué, angiodyplasie ostéodystrophique ◇ **Klippel-Trenaunay syndrome** ◇ **azoniad Klippel-Trenaunay** Azoniad oc'h anadiñ er vugeliezh pe er c'hrennoad, naouus, e par un ezel, dre un angiom plaen, miwe ar gwazhiennoù (teuc'hellou), usteñv an eskern hag ar parzhioù meizh.

Klotz : syndrome de ~ ◇ **Klotz's syndrome** ◇ **azoniad Klotz** Bugelvanegezh c'hanadel, angwe ar muzelloù bihan, enebrezh downvanek, a-wechoù kreñvegezh, a-geñver gant an dargemm etre ur fenotip benevel hag ur rev c'henrizhel gourevl.

NOTENN : Erlec'hiet eo bet an anvad *Down(s) syndrome* ouzh *mongolism* e 1965 gant ar WHO (*World Health Organization*); hiziv e kaver arveret ivez ar c'henster *trisomy 21* hag, e galleg, an adanv deveret *trisomique (21)*; da heul, ez eo bet erlec'hiet Br. *azoniad Down* (ha *trizomiezh 21*) ouzh *mongolegezh* ha *trizomek 21* ouzh *mongolek*; koulskoude e kendalc'h aozerion 'zo da arverañ deveradoù diwar *mongol-* e degouezhioù 'zo, da skouer pa reont gant Sz. *mongoloid*, Gl. *mongoloïde* ("o tennañ da azoniad Down") war zigarez ma chomfe boud o yezhoù da luniañ ur c'hevatal dereat d'an adanv-se; o taveñ da anvad kefridiel an azoniad, e kredan kinnig eno ar c'hevatal Br. *downvanek*.

Klüver-Bucy : syndrome de ~ ◇ **Klüver-Bucy's syndrome** ◇ **azoniad Klüver-Bucy** Teskad strafuilhoù stadet goude un tolbezennenezvenañ ividig ha da geñver isteñvoù 'zo a 'r bluskenn empenn : tuadur da gas nep traezenn d'ar genoù, ankoun, ankewant, ansip, heudadur revel.

Knowles : triade de ~ ◇ **Knowles' triad** ◇ **triadezh b. Knowles** Teskad an tri azon pennañ eus ar pellagr : darc'hoal, erzerc'hadoù kroc'hen, strafuilhoù bred.

Köbner : phénomène de ~ ◇ **Köbner's phenomenon** ◇ **anadenn Köbner** War un tachad kroc'hen bonan o paouez bezañ heget pe daraezet, dinodiñ un dermatoz (liken plaen, psoriasis) bezant endeo en ul lec'h all eus ar c'horf.

Koch : postulats de ~ ◇ **Koch's postulates** ◇ **kentradioù l. (g.) Koch** Evit prouiñ ez eo ur garvez *a* arbenn ur c'hleñved *b.* ez eus 4 amplegad : 1) *a* a ranker kavout e pep degouezh eus *b.*, 2) *a* a ranker gallout goubarañ e tiñvadur pur, 3) *a*, ankoret d'un danvevad darbennus, a rank devoudañ *b.*, 4) da heul, e rank *a* bezañ goubaret diouzh an danvevad aet klañv.

Koch : triangle de ~ ◇ **Koch's triangle** ◇ **tric'horn g. Koch** Tachad tric'hornek eus talbenn dehou ar spur etre-kentezoù dezvonnet gant an enlenad eus broud tilhennel an trapig tribroudek ha digor ar god kuruner, ma emañ ar c'hlom kentez-kofig.

Kocher : fractures de ~ ◇ **Kocher's fractures** ◇ **torroù l. (g.) Kocher** 1 *Torr treuzpennig* (Gl. *fracture diacondylienne*), torr eus penn traoñ ar paler, e linenn o tremen diadrez dreist an arskodennoù kostezel ha kreizel hag o tredañ an talbennoù kenvelañ. 2 *Torr raktorzhellel* (Gl. *fracture pré-tuberculaire*), a zo e linenn o vont, a-veskell war drañ ha war ziabarzh, eus lodenn grenn an dorzhell vras da lodenn drañ ar gouzoug korfadurel.

Kocher : signes de ~ ◇ **Kocher's signs** ◇ **arouezioù l. (b.) Kocher** Arouezioù ar skoedusvorc'hegezh : 1) didennañ reñverek ar valvenn da geñver ar strivoù da studañ ar sell; 2) pa zurec'ha ar gouziviad e selloù war grec'h, e sav ar valvenn buanoc'h eget al lagad.

Köhler : maladies de ~ ◇ **Köhler's diseases** ◇ **kleñvedoù Köhler** 1 Artroz ha boukadur ar skafeg (Gl. *scaphoïde carpien*) e dianlen arver ar benvegjinennoù dalc'het gant an dorn, evel an horzhataerioù (sl. *maladie de Kienböck*). 2 Bulzunegfo (Gl. *scaphoïdite tarsienne*), anaez ar vugale hag ar grennarded, naouus dre ul laur lemmoc'h diouzh an noz, koeñvadur ar parzhioù meizh, hag, ent skinourel, digresk ec'honad an askorn, anaez o parañ dindan un nebeut mizioù; dianav e arbenn. 3 Anaez anavezet dindan an anvadoù *talpennfo kreiztroadel Köhler* (Gl. *épiphyssite métatarsienne de Köhler*) ha *kleñved Freiberg*, osteokondroz penn eil askorn ar c'hreiztroad o tizhout ar c'hrennarzed hag o tedeñv gorrek d'ar pare. 4 Osteokondroz ar grennarded, o tizhout ar padellek, hemañ oc'h anadiñ war ar skinlunioù e rezh dastammadoù direoliek, anaez o tedeñv herrek etrezek ar pare.

koilocytes ◇ **koilocytes** ◇ **koilokit s.** Kelligoù gronnet o c'hraoñell gant ur vakuolenn a zisvoint o c'hitoplasm d'an trobarzh; o c'havout a reer e gweleadoù etreat pe diavaez un epitelienn poreet gant ur papillomaviruz.

kolatisme ◇ **chronic kola poisoning** ◇ **kolaegezh b.** Pistriadur gant krañv kola, usreer en arvar da zec'han estoue, naouus dre anahun, anilboued, treutadur ha strafuilhoù kalon.

Koller : épreuve de ~ ◇ **Koller's test** ◇ **prouad g. Koller** Prouad amkanet da erc'hwiliañ arc'hwelerezh an avu dre vuzuliañ amzer Quick a-raok ha goude diounit vitamin K; pa zistro un amzer Quick re hir d'ur werzhad reol goude ar sankadenn, e tezreer bezañ un negezh enankañ pe sugañ ar vitamin K gant ur gouziviad bonan e avu; hiraet e chom avat pa vir ur skorted avu a zanzeñv ar vitamin.

kongo ◇ **kongo** ◇ **kongo g.** Kleñved darreuziadek a stader gant ar vugale e kêriadennoù 'zo eus Kongo, o teraouiñ dre ur c'hammeraez laurus eus an izili traoñ hag an dargreiz, o tedeñv herrek en un treuzezezi gwak da gentañ, dasstrizhek da c'houde, diwezhel; dianav eo an arbenn anezhañ.

König : syndrome de ~ ◇ **König's syndrome** ◇ **azoniad König** Azoniad naouus dre waskadoù poan gof o tarvezout goude ar predoù, lec'hiet spis, war grisaat e-doug un nebeut munodoù hag o steuziañ en un taol gant bourbouilhadennoù hag a-wechoù darc'hoal dourek; an erzerc'had eo eus ul lec'hienn isvoll war ar vouzellenn voan o tec'han uc'hamdonnegezh en argrec'h.

Königstein-Lubarsch : maladie de ~, para-amyloïdose ◇ **Königstein-Lubarsch disease**, **paraamyloidosis** ◇ **kleñved Königstein-Lubarsch**, **paramiloidoz g.** Seurtad dibaot amiloidoz, naouus dre anafoù flugez niverus, er galon dreist holl, met

ivez er c'higennoù, en nervreizhiad, en treizher, er c'hreuz, er c'hargadenn, en arzoù, er felc'h, h.a. ; alies e vez tizhet ar c'hroc'hen, e rezh krugenoù bihan hanterbellennek koarvanek en dro d'an igorenoù (en dremm pergen), livegadur ar gouzoug, ensiladur an teod (teodusvent); anaez o tedeñ d'ar marv a-benn un nebeut bloavezhioù dre falladur kalon pe fallezh (sl. *amyloidose*).

konzo ◇ **konzo** ◇ **konzo** g. Treuzezizi dasstrizhek o tizhout merc'hed yaouank ha bugale eus ploueoù paour kreiz Afrika e rannvloaz ar sec'hor, naouus dre un deoù trumm hag un daolenn glinikel heñvel ouzh hini al latiregezh; dec'haret eo gant un negezh soufr ha protein a-ser gant ur pistradur dre ar gianidenn chomet er maniok prientet fall (sl. *cassavisme, lathyrisme*).

Koplik : **signe** ou **tache de** ~ ◇ **Koplik's spots** ◇ **arouez** b. pe **pikou** l. (g.) **Koplik** Ragazon ar ruzell e rezh brizhennoù ruz, en o c'hreiz ur pik gwenn azglas, arront ha balirek, oc'h anadiñ war dalbenn diabarzh an divvoc'h daou pe dri devezh a-raok an dispuilhad hag o steuziañ a-benn tri devezh.

Korotkow : **phases** ou **bruits de** ~ ◇ **phases of Korotkow (sounds), Korotkow's sounds** ◇ **koulzoù** (l.) g. **Korotkow, tonioù** (l.) g. **Korotkow** Araezad studi ar gwask talmerel dre andalañ an trouzoù merzhet dre ur stetoskop harpet e gennenn ouzh talmerenn ar vrec'h en ardraoñ da vrec'hgenn un talmerwaskventer; adalek ar par uhelañ [*tav krec'h* pa vez uheloc'h ar gwask er vrec'hgenn (GB) eget ar gwask sistolel (GTs)], betek ar par izelañ [*tav traoñ* pa ziskenn ar GB dindan ar gwask diastolel (GTD)], e tiorc'her pevar c'houlz : *a*) tonioù sec'h a read etre (gwask uc'hek), *b*) tonioù fuc'hus ha damvouget, *c*) tonioù sec'h ha kreñv ouzh kreñv, *d*) tonioù gwan ha goloet pa nesa ar GB d'ar GTD.

Korsakoff : **psychose** ou **syndrome de** ~ ◇ **Korsakoff's** or **Korsakow's psychosis or syndrome** ◇ **psikoz** pe **azoniad Korsakow** Ent klasel, kevreted ul liesnervennfo etilel, un ankoun dianezat dreist holl, an ezaouiñ, ar c'hammaznaout, an tuadur d'an imbroudellañ, an arbenn o vezañ an alkoolegezh o tevoudañ un anvitaminegezh B kiriek da zic'henezh-adur ar c'horfoù bronnheñvel; hiziv ez astenner stern an arbennelezh d'an anafoù daoudu o tizhout an amred pennmarc'hig-senklenn-derc'hvel-bronnheñvel ageter gant an un azoniad (sl. *alcoholisme, encéphalopathie alcoolique, Gayet-Wernicke : encéphalopathie pe maladie de* ~).

kouriatrie ◇ **adolescent medicine** ◇ **Kenevouriezh** b. Skourr ar Vezekniezh o plediñ gant ar grennarded (sl. *courologie*).

NOTENN : Gl. *kouriatrie*, koulz ha *courologie*, termenou nemeur arveret, a hañval degemer an un despiadur.

Kouwenhoven : **méthode de** ~ ◇ **Kouwenhoven's method** ◇ **hentenn** b. **Kouwenhoven** Araezad leuñviñ kalon a-ziavaez : harpañ a ra an operataer treñv e zaouarn lakaet an eil war egile ouzh lodenn draoñ klerenn ar gouzviad ha pouezañ anerzh diouzh ur c'hellusk a 60 dre vunud, leuñverezha a ranker kevrediñ gant ar gwenterez kalvezadel (deanalañ genoù-ouzh-genoù en un talm a 15/min) (sl. *bouche-à-bouche : méthode du* ~, *massage cardiaque*).

Kräpelin : **maladie de** ~, **psychose présénile pernicieuse d'Oksala** ◇ ◇ **kleñved Kräpelin, psikoz rakkozhiadel yud Oksala** Seurtad envedi rakkozhiadel nes da gleñvedoù Pick hag Alzheimer, ma chom leiek anafoù ar bluskenn empenn ha ma vez muiek an dedreñ gouvidel.

Kraske : **opération de** ~ ◇ **Kraske's operation** ◇ **operatadenn Kraske** Dazbidañ darnel ar youlc'h diraezet dre forzh ar gaozell, gwezh o hepkoriñ ar c'hofenbenañ ha hebiat d'ar c'helc'hstrishaerioù.

kraurosis penis ◇ **kraurosis penis** ◇ **kraurosis penis** Skleroz kozhiadel argreskus eus gweuz ar veskenn, kevret gant isteñv hag a-wechoù leukoderma glaourgenn ar vezenn, isvoll gwask diavaez ar c'han troazh, korwazhiedusvoll, o tedeñ d'un amgul trebadek hag andreadus.

kraurosis vulvae, maladie de Breisky ◇ **kraurosis vulvae** ◇ **kraurosis vulvae** Isteñv hag angrizañ amwiskadoù an organoù genel diavaez a r merc'hed, kevret gant un debron garv o tarvezout goude ar paouez mizioù pe ar vrierezvenañ.

Krebs : **cycle de** ~, **cycle tricarboxylique, cycle de l'acide citrique** ◇ **Krebs cycle** ◇ **kor** g. **Krebs, kor trikarboksilek, kor an drenkenn gitrek** Steudad dazgweredoù enzimetek e diabarzh ar mitokondri, o c'henel gremm dre ec'haozañ ar glukid; diwar goerezh anaerat ar glukoz e tisoc'h an drenkenn laktek a ya da drenkenn biruvek ha, da heul, da aketilkoenzim A, elfenn a vez oksidet en he fezh e-pad ar c'hor : kendouesaat a ra da gentañ gant an oksalaketat da barañ ur c'hitrat ha, da heul ur widennad hir a zazgweredoù oksidañ, dazgenel an oksalaketat hag e se skoulmañ ar c'hor; eret eo hemañ, a du 'rall, gant argerzhioù kennevidel ma kemer perzh protid (amindrenkennoù) ha lipid; hervez an tennadoù anezhañ e vez dilaosket CO₂, ion H⁺ ha trenkenn adenosin-trifosfat (ATP), pennañ mammenn ar gremm er bevedeg.

Krebs-Henseleit : ~, **cycle de l'uréogénèse** ◇ **Krebs-Henseleit cycle, urea cycle** ◇ **kor Krebs-Henseleit, kor an urebarañ** Ristennad dazgweredoù enzimetek setez en avu dreist holl, o treuzfurmiñ an amoniak, dilerc'hiad nitrogezek pistriek, en urea dinoaz; enno e kemer perzh an ornitin; dazganet e vez hemañ e dibenn tennadoù ma tinod ar c'hitrullin hag an arginin ha ma vez dilaosket an urea.

kringle ◇ **kringle** ◇ **kringel** g. (Termen danek, anvad ur wastell dezhi furm ur gurunenn) Domani amparet gant ur c'hemalad amindrenkennoù stalet e rezh un dol, luniad a stader er plasmogen hag el lipoprotein A.

NOTENN : Er Vevoniezh volekul e reer *domani* (Gl. *domaine, Sz. domain, Al. Domäne*) pe *domani proteek* (Gl. *domaine protéique, Sz. protein domain, Al. Proteindomäne*) eus un elfenn parzhiañ en ur protein [pe ur protein kemplezh (immunoglobulin da skouer), pe un isunvez proteek (digorvell polipeptidek, kemalad trenkenn nukleek)] o piaouañ ul luniad pe un arc'hwel dibarek. Da amparañ an darn vuiañ eus ar proteinoù ez a lies domani.

Krukenberg : **tumeurs de** ~ ◇ **Krukenberg's tumors** ◇ **yoc'hennoù Krukenberg** Hanweoù eilvedel ar vierrez, daoudu alies, dasses diwar gankroù ar stomok, ar c'holon, ar vronn pe ar skoedenn.

Künitz : **inhibiteur de** ~ ◇ **Künitz's inhibitor** ◇ **heuder** g. **Künitz** Polipeptid paret en ilgreiz, o skoilhañ ouzh gwered an enzimoù proteolitek (tripsin, kimotripsin, fibrinolizin); mirout a ra ouzh ar fibrin a zileizhañ dindan delanvad ar fibrinolizin; diounezet e vez ouzh ar fibrinloezañ lemm hag an ilgreizfo lemm gwadliñvus.

Küntscher : **méthode de** ~ ◇ **Küntscher's method** ◇ **hentenn** b. **Küntscher** Prederiadur an torrou eus treuzenn eskern an izili dre ebarzhiñ un tach dir e kavenn ar mel war he hed en amboaz derc'hel an daou damm kengovlet el lakadur azas.

Kupffer : **cellules de** ~ ◇ **Kupffer's cells** ◇ **kelligoù** l. (b.) **Kupffer** Makrofag steredennek bezant e goload endotetel gwazhied an avu.

kupfférian ◇ **pertaining to Kupffer's cells, kupfferian** ◇ **kupferel** aa. A-zave da gelligoù Kupffer.

kupfférome, réticulo-angio-sarcome du foie ◇ **Kupffer's cell sarcoma, kupfferoma** ◇ **kupferom** g. **retikuloangiosarkom** g. **an avu** Yoc'henn yud kentael an avu, evodet diouzh kelligoù Kupffer.

Kurt-Mendel : **syndrome de** ~ ◇ **Kurt-Mendel syndrome** ◇ **azoniad Kurt-Mendel** Diabet heuz kevret gant seizi an nervenn a-boleenn.

kuru ◇ **kuru** ◇ **kourou** g. Empennfo a stader er meuriad Fore (Papouazia hag e Ginea Nevez), dezhañ ur gounervezh hir, un deroù dre zireizhoù ar c'herzhed, ur bog dre arouezioù ilpennel, krenerezh, fiñvoù koreoatetozel, un dedro dre an envedi hag ar marv dindan un nebeut mizvezhioù; an anafoù zo re an *empennaouedoù goulemm spouevanek treuzkasadus*; ur prion eo ar gwezher kiriek (sl. *encé-phalopathie subaiguë spongiforme transmissible*).

Kussmaul et Kien : **respiration de** ~ ◇ **Kussmaul-Kien breathing** ◇ **analerezh** g. **Kussmaul-Kien** Rizh analerezh a stader er c'homa diabetien, anezhañ lerc'h ouzh lerc'h un enanalad don, ur paouez berr war enanalad helc'het hag un ec'hanalad berr ha keinus, ur paouez berr adarre.

Küster : **hernie de** ~ ◇ **Küster's hernia** ◇ **avelenn** b. **Küster** Avelenn varlennel bas : oc'h ogañ er gwiad kellaouek endan-groc'hen, dirak lientirenn ar gigenn veskellek diavaez.

kwashiorkor, pellagre infantile, stéatocirrhose carentielle de sevrage ◇ **kwashiokor** ◇ **kwachiokor** g., **pellagr** g. **mabanel, steatokirroz** g. **negezienn an dizonañ** Furm c'hrevus kammvezhur proteingremmel o tarvezout gant ar vabaned e kornog Afrika da geñver o dizonadur, naouus dre strafuilhoù breidel (tristezh, galeniezh, ankwant), anafoù kroc'hen (lindrad arzu gourc'hennus o lezel war he lerc'h ul liv ruz-mouk gant an amwiskadoù — e Ghana e talvez *kwachiokor* kement ha “bugel ruz”), blev reut ha hedorr, arsav a 'r c'hreskiñ, isteñv ar c'higennoù, darc'hoal hag avufel'husvent, anazark hag amwad, alies dedro d'ar marv (sl. *cirrhose carentielle*).

kyste ◇ **cyst** ◇ **kist** g. Nevezfurmadenn e rezh ur gleuzenn gloz hep keñver gwazhiedel gant he endalc'had, pallennet en diabarzh gant ur goload epitelem pe endotelem, leun gant un danvezenn peurliesañ liñvel pe gludek, a-wechoù aezhel pe, dibaot, sonnel.

kyste aérien du poumon ◇ **cyst of the lung** ◇ **kist aezhel ar skevent** Kavennoù aezhel, unel pe liesel, bezant en un pe lies tolbezenn skevent; deskrivañ a reer ar *k. ganedigell*, dibaot (*k. rizhellviweel*, Gl. *k. dysembryo-plasiques*); ar *k. arzeuat* (gloevennoù emfizem, aezhvozhelloù, kleuzennoù e dilerc'h ur pugnez pe ur vougev dorzhellek) (sl. *bulle pulmonaire, dysembryoplasie, pneumatocèle*).

kyste anévrisimal des os ◇ **aneurysmal bone cyst** ◇ **kist darvollel an eskern** Anaf kuñv, kantet, e-barzh ardalpenn un askorn hir pe korf ur vellenn e rezh gwiad stirek ennañ kleuzennadoù gwad, o tarvezout gant an den yaouank goude un daraez; pareañ a ra goude karzhellañ hag unanimboud.

kyste de l'ovaire ◇ **ovarian cyst** ◇ **kist ar vierez** Kist liñvennek evodet diouzh ar vierez, gwech *unlog*, gwech *lieslog*, en ervez da ziraec un ec'honad bras.

kyste dermoïde ◇ **dermoid cyst** ◇ **kist dermoïdel** Kist a 'n dremm pe a 'r gouzoug, dilerc'h un ambac'had eus an ekto-derm rizhellel, heñvel luniad e speurioù ouzh hini ar c'hroc'hen, oc'h enderc'hel borc'hadou ar gwagrennoù soav ha c'hwezpar (sl. *dermoïde*).

kyste sébacé, loupe ◇ **sebaceous cyst** ◇ **kist soavel** Yoc'henn evodet diouzh ur wagrenn soav e rezh ur c'hodellad druzenn ha kelligoù epidermel.

kyste synovial ◇ **synovial cyst** ◇ **kist irgennel** Godell leun gant ul liñvenn c'hludek sezet peurliesañ war dalbenn kein an arzorn, evodet diwar irgenn an arzoù hag ar stirennoù.

kystectomie ◇ **cystectomy** ◇ **kistezvenañ** Amzivenañ ur c'hist.

kystique : **maladie** ~, **polykystose** ◇ **cystic disease** ◇ **kleñved kistel, lieskistegezh** Anvad rumm ar c'hleñvedoù naouus dre vezañ kistoù e-barzh an organoù : 1) *k. k.* pe *lieskistel an avu* (Gl. *m. k. du foie, Sz. polykystic liver*), anaez lieskistel, anarvevadel, dibaot; 2) *k. k. ar c'haved* (Gl. *m. k. de la mâchoire, Sz. epithelial odontoma*), epiteliom liesannonek, o trediñ gorrek ha hep hollekaat; 3) *k. k. ar vronn, kleñved Reclus* (Gl. *m. k. de la mamelle, maladie de Reclus, Sz. cystic disease of the breast*), lieskistegezh an divvronn, sellet gant an darn vuiañ eus an aozerion evel ur furm a vronnfo henek; 4) *k. k.* ar vezonenn lounez (Gl. *m. k. de la médullaire, Sz. medullary cystic disease of the kidney*), kleñved hêrezhel, o teraouiñ manguñv gant an den yaouank, naouus dre an amwad, ar goursec'hed hag an ustroazh, isdevec'hiusted al lounez ha, gant ar bugel, an dilerc'hiñ savder-pouez; ent neuziadurel, e stader un isteñv a 'l lounez, kistoù niverus hag anafoù en tuellennoù; dedreiñ a ra d'ar marv a-benn un nebeut bloavezhioù; 5) *k. k.* pe *lieskistel al lounezhi* (Gl. *m. k. des reins, polykystose rénale, Sz. polycystic kidney*), anaez hêrezhel aotozomek trec'hek, oc'h anadiñ er gaezouregezh, naouus dre lounezhi aloubet gant ar c'histoù, mentek, bolbousek,

teutadus aes ha laurus, troazhwadegezh, resmiadoù poreadur hag, anez treuzplantañ, dedro marvus a-raok pemont vloaz; 6) *k. k. ar glidenn* (Gl. *m. k. du testicule*, Sz. *fibro-cystic disease of the testicle*), epiteliom mukoidel, keveleb da gist ar vierez.

kystitome ◇ **cystitome** ◇ **kistitom** g. Benveg surjaniel amkanet da zigeriñ pourc'had araok ar ferenn da geñver oberatadenn ar ferennlug.

kystographie ◇ **cystography** ◇ **kistluniñ** Skinluniñ ur c'hist goude erlec'hiañ un Xdemerenn ouzh an endalc'had anezhañ

L

lab, lab-ferment ◇ **lab ferment** ◇ **lab g.**, **labgoell g.** Enzim bezant e sug ar c'hreiz, gantañ ar perzh da gaouediñ an albumin, puilh e-barzh stomok al loened yaouank hag er c'hoedenn : kaouediñ a ra raktal kazein al laezh.

labile : **courants** ~s ◇ ◇ **redoù l. (g.) ampadek** Redoù tredan untu arloet a-span ouzh ar c'hroc'hen.

labile

- *affect labile* kantaезд silwink
- *émotivité labile* fromerezh hevrall
- *hypertension labile* uswask diaspan
- *infiltrat labile du poumon* ensilenn hesteuz ar skevent
- *protéines labiles* proteinoù bresk.

labiolecture, labiomancie ◇ **lip reading, lipreading** ◇ **gweuznodiñ** Intent al lavar dre arseliñ fiñv an divweuz.

NOTENN : Daou lankad ar *gweuznodiñ* eo ar *gweuzennodiñ* (ober, diarzoug pe diarvenn, fiñvoù lavarel gant an divweuz) hag ar *gweuznodiñ* (an desteriañ anezho).

labrum, bourrelet articulaire ou **annulaire** ou **marginal** ou **périarticulaire** ◇ **labrum** ◇ **erien g.** Furmadur stirvigornek gwalennek stag ouzh tro un talbenn kenvellañ.

labyrinthectomie ◇ **labyrinthectomy** ◇ **milendallezvenañ** Ezklazañ surjanel hollel pe darnel ar milendall.

labyrinthite ◇ **labyrinthitis** ◇ **milendallfo g.** Skouarnfo diabarzh o wazhañ ar milendall pergen.

labyrinthotomie ◇ **labyrinthotomy** ◇ **milendallenbenañ** Digeriñ surjanel ar milendall.

lacet : **signe du ~** ◇ **touriquet test** ◇ **arouez g. ar rolt** Un amwask arloet ouzh ar vrec'h da astaliñ an amred gwazhiennel hepken a ra d'ar c'horrwazhied fregañ ha da fennigoù anadiñ, niver ar re-mañ o vezañ andalad breskted ar c'horrwazhied (sl. *capillarodynamomètre*).

lacet de soulier : **signe du ~** ◇ ◇ **arouez al lasañ** Laur en argreuzenn o saezhenniñ war grec'h, oc'h anadiñ pa stou ar gouziaviad war raok, da skouer evit lasañ e votez, arouez un avelenn c'hremel (sl. *hernie*).

Lachman : **manceuvre de ~** ◇ **Lachman's maneuver** ◇ **kefleuñvad Lachman** Amprouad erglask un anaf eus ar stagell e kroaz araok-diavaez : ar gouziaviad gourvezet a-gein pe azezet war vord un daol, pleget e c'hlin da 20°, e fester gant un dorn penn traoñ ar vorzhed ha gant an dorn all e tefiñver war raok penn krec'h ar c'har ; yaek eo an amprouad mar lakaer war wel un laoskded ezreol eus ar c'henvell ; dre an amprouad gin (defiñval war dreñv) ez erglasker anaf ar stagell e kroaz adreñv.

lacrymal ◇ **lacrimal** ◇ **daeraouel aa.** A-zave d'an daeroù.

lacrymogène, dacryogène ◇ **lacrymatory, dacryogenic** ◇ **daerieat aa.**, ~**daeraouiñ, daeraouus aa.** O tec'han borc'hadur an daeroù.

lactacidémie ◇ **lactacidaemia** ◇ **1 gwadlaktegezh b. 2 laktekwadvec'h g.** 1 Bezañs trenkenn laktek er gwad. 2 Feur trenkenn laktek er gwad, reol etre 0,6 hag 1,8 mmol/l, o vuiaat gant al labour kigenneel tenn ha da geñver an akidoz laktek (anoksiezh, divig enzimatek ganedigel, pistriadurioù 'zo, h.a.) (sl. *hyperlactacidémie, lactatémie*).

lactarium ◇ **human milk banking** ◇ **bank g. laezh** Gwazadur amkanet da zastum ha da arougoriñ laezh denel.

lactase ◇ **lactase** ◇ **laktaz g.** Enzim borc'het gant pervez (yunegenn pergen) ar bronneged yaouank, o treluskañ dourrannadur al laktos e glukoz ha galaktos.

lactatémie ◇ **lacticaemia** ◇ **1 gwadlaktategezh b. 2 laktatwadvec'h g.** 1 Bezañs laktatoù (halioù a 'n drenkenn laktek) er gwad. 2 Feur laktatoù er gwad, reol etre 0,63 ha 2,44 mmol/l (sl. *lactacidémie*).

1 lactation, allaitement 2 lactation ◇ **1 nursing, feeding 2 lactation** ◇ **1 laezhañ 2 laezhparañ** 1 Magañ ouzh ar vronn, bronnañ. 2 Borc'hañ ha degorzhañ al laezh (sl. *ablactation* hag *Errata*, GEVEZ-2 397 +7, *galactopôïese*).

lactéal ◇ **lacteal** ◇ **laezhel aa.**, ~**laezh** A-zave d'al laezh, sk. : *dent laezh*.

NOTENN : Hogos bepred e kaver Gl. *lactéal* er c'herienn *dents lactéales* (kensterioù : *dents de lait, dents déciduales*) tra ma 'z eo ledanoc'h erdal Sz. *lacteal* — evit d'an daou hanc'her Gl. *lactéal* ha Sz. *lacteal* bezañ nemeur arveret (sl. *dents*).

- lactique** : acide ~ ◇ **lactic acid** ◇ **trenkenn b. laktek** Trenkenn-alkool o tisoc'h eus direadur an drenkenn biruvek dre al laktiko-dezhidrogenaz (LDH); sevel a ra e feur e-doug al labour kigenneel tenn dre benn ar glikogenloezañ anaerata.
- Lactobacillus** ◇ **Lactobacillus** ◇ **Lactobacillus g.** Genad bakteri eus kerentiad al *Lactobacillaceae* ha skourrad ar *Firmicutes*, gougevret outañ spesadoù niverus, a zo reoù anezho bezant ent reol er ganol vezhur hag er gouin; a du 'rall e vez al *l.* arveret boas el laezherezh (oberierezh keuzioù).
- Lactobacillus acidophilus, bacille de Döderlein** ◇ **Lactobacillus acidophilus, Döderlein's bacillus** ◇ **Lactobacillus g. acidophilus, bazhell b. Döderlein** Bazhell Gram+, lodek boas e garveveg ar gouin.
- lactobutyromètre** ◇ **lactobutyrometer** ◇ **druzventer g. -ioù, laktobutirometr g. -où** Ardivink da vuzuliañ feur an druz-ennoù el laezh.
- lactose, sucre de lait** ◇ **lactose, milk-sugar** ◇ **laktoz g., sukr g. laezh** Diholozid bezant el laezh, ec'haozadus e glukoz ha galaktoz (sl. *holoside*).
- lactose** : intolérance au ~ ◇ **lactose intolerance** ◇ **angougemer al laktoz** Dic'halluster da gennevadañ al laktoz euvret, pe *a*) diwar un diouer laktaz ganediged, pe *b*) diwar an anvorc'h anezhañ e dianlen un anaez pervez (kreuzpervezfo lemm, kleñved torel, arvevadegezh, dazbidañ surjanel un tammad eus ar vouzellenn voan), pe *c*) gant un oadour bonan, da heul ur reñver euvriñ laezh; naouus eo dre an treutadur, an darc'hoal hag an troazhlaktozegezh (sl. *alactasie, lactosurie, maladie cœliaque*).
- lactose** : test de tolérance au ~ ◇ **lactose tolerance test** ◇ **prouad gougomer al laktoz** Pa vez un den bonan, e bervez o vorc'hañ reol al laktaz, oc'h euvriñ 1 pe 2 l laezh, e sav dreist 2 g/l e wadvec'h glukoz, endra chom izeloc'h ar feur-se e tro un isvorc'h laktaz, eleze un angougemer laktoz.
- lactosérum, petit lait, mègeue** ◇ **whey** ◇ **laezhvez g., gwipad g.** Liñvenn o chom e dilerc'h kaouledadur al laezh, ezvezant enni ar c'hazein ha bezant al laktalbumin, al laktoglobulin, al laktoz hag an halioù meinel.
- lactosurie** ◇ **lactosuria** ◇ **troazhlaktozegezh b.** Bezañs laktoz en troazh; *t. padek ar bugel* (Gl. *l. permanente de l'enfant*), kleñved hêrezhel treuzkaset er mod enkilek, naouus dre isvorc'h pervezel al laktaz, o herzel ouzh kennevidadur al laktoz, erzerc'haet dre an olteñv, an anilboued, un darc'hoal henek hag un akidoz lounezhel.
- lactotrope** : cellules ~s ◇ **lactotropic cells, prolactin cells, lactotrophs, mammothrophs** ◇ **kelligoù l. (b.) laezhwezher** Kelligoù eus ar rakgougorfenn o vorc'hañ ar prolaktin (sl. *prolactine*).
- lacunaire** ◇ **lacunar** ◇ **1 loezeneg g. -eion 2 loezennel aa.** 1 Gouziviad ar seizi gaouhirvelel. 2 A-zave d'ul loezenn pe da loezennoù.
- lacune** ◇ **lacuna** ◇ **loezenn b.** (Skinouriezh) skeudenn diouerek he douester skinourel, 1) war ul lunad andarbar, e stumm ur c'horreenn sklaer (en un askom, da skouer); 2) war lunad ur forzh demeraet, e stumm ur boulc'h (grouanenn, yoc'henn ar ganol vezhur, kaouledenn, plakenn aterom en ur wazhiedenn); 3) war ur skingannlunad, e stumm un tachad isdelen d'an izotop.
- lacunes** ◇ **cerebral lacunae** ◇ **loezennoù l. (b.) empenn** Anafoù skleroz kozhiadel e-barzh gwiadoù ar mel penn e rezh kleuzennoù diwar angwazhiadoù bihan er steuñvenn wenn hag e gronnoù an diaz, erzerc'haet dre ar seizi gaouhirvelel (sl. *paralysie pseudobulbaire*).
- Laffont** : signe de ~ ◇ ◇ **arouez b. Laffont** Laur en argreuzenn, dindan an trebez pe er skoaz a stader a-wechoù pa vez ur gwadliñv en ampeleñn ha pa sav ar fennad gwad betek ar gelec'hspuenn.
- Lafitte-Barié** : syndrome de ◇ ◇ **azoniad Lafitte-Barié** Isvoll digenvez ar gernenn dalmerel, kammneuziad kalon a zeskriver daou seurtad anezhi : an *isvoll ledek a 'r gernenn dalmerel*, ma vez direet rurva ar c'hofig dehou d'un naoz strizh gronnet gant speurioù tev, an *isvoll kelec'hspuennec a 'r gernenn dalmerel*, e stumm ur walenn azgwenn lec'hiet pell pe belloc'h diouzh an trapig skeventel.
- lagophthalmie** ◇ **lagophthalmos** ◇ **ished g. ar malvennoù, malvennished g.** Berrded ezreol ar malvennoù nad int ket evit peurc'holeiñ ar voull lagad.
- lait et des alcalins** : syndrome du ~, syndrome des buveurs de lait ◇ **milk-alkali syndrome** ◇ **azoniad al laezh hag an alkaliegou, azoniad laezhalkaliek, azoniad an everion laezh** Skorted lounezh azonet gant alkaloz ha gwadusvec'h kalkiom hag urea o tarvezout gant klañvourion prederiet ouzh un angreizh a 'n daouzegenn dre euvradoù bras halioù alkaliek, halioù kalkiom pe laezh; al liesañ eo ar *furm henek* naouus dre goc'hionadoù razek en holl wiadoù : kroc'hen, kenvelloù, komsae, talmerennoù, skevent, kalon, lounezhi pergen (sl. *Burnett* : *syn-drome de ~*); *furmou lemm* a zeskriver, naouus dre c'hweladoù, eldroazh, asikted, morgud, dourisvec'h ha troazhusvec'h kalkiom, o parañ prim hep arlenad, ha *furmou goulemm* pe *azoniad Cope*, ma vez tizhet alies an daoulagad, o lezel war o lerc'h ur gwadusvec'h kalkiom oc'h argizañ gorrek hag ur skorted lounezh diwezhel a-wechoù.
- lallation, lalliment** ◇ **lalling, lallation** ◇ **lallaiñ** Argaozeal ar vabaned.
- lalopathie** ◇ **lalopathy** ◇ **mic'heriañ** Anvad rumm ar strafuilhoù en eztaoliñ ar gerioù dre gomz pe dre skrid, evit a sell an distilh pe an arver anezho.
- Lalouette** : pyramide de ~ ◇ **pyramidal lobe** ◇ **tolbezenn bikernennek** Tolbezenn anarstal kreizer ar skoedenn.
- LAMB** ◇ **LAMB** ◇ **LAMB** Gwreskanv diwar an anvadoù saoznek : *Lentigin, Atrial Myxoma, Blue naevi*; kevreted familhel, dianav he orin, ouzh he ober miksom kentezel, lentiginoz ha nevuz.

lambda ◇ **lambda** ◇ **poent g. lambda, lambda g.** Poent kejañ ar vellez a-saezh hag ar vellez lambda.

lambdacisme, lallation, lallissement ◇ **lambdacism** ◇ **lefeañ** Kammzistagañ ar soniad [l] dre erlec'hiañ outañ ar soniad [λ], pe ar soniad [r] dre erlec'hiañ outañ ar soniad [l], sk. : Br. *mell* distaget [μελ], Br. *Mari* distaget [mali].

lambeau

• *arrachement d'un lambeau d'iris* digrakañ un drailhenn eus an envez • *lambeau cutané prélevé au voisinage immédiat ou à distance* drailhenn groc'hen dezvenet anes pe a-bell • *lambeau vésical tubulisé* drailhenn c'hwezhigell dolennet • *par greffe d'un lambeau épiploïque* dre imboudañ un drailhenn danter.

Lambert : loi de ~ ◇ **Lambert's cosine law** ◇ **savelenn Lambert** Savelenn o kevaraezañ jediñ an doenadoù skinoù ionaus : “kenfeuriek eo an doenad degemeret gant ur c'horreenn da read ar red tredan o tremen dre ar gorzenn skinc'haner, kenfeuriek da bad an arloadur ha ginfeuriek da zaouvac'had ar pellder etre ar c'horreenn ha sti ar gorzenn”.

Lambert : point d'inflexion de ~ ◇ ◇ **poent argrommañ Lambert** Parzh eus ar mellkein ma c'hoarvez ent hanbarek an torrou ameeun, loet er rann eus al livenn loet etre ar rakwar bruskel hag an drekwar dargeizel, e se oc'h angorzhañ an div vellenn vrusk diwezhañ hag an div vellenn dargeiz kentañ.

Lambert-Eaton : syndrome de ~ ◇ **Lambert-Eaton syndrome** ◇ **azoniad Lambert-Eaton** Azoniad nervgaherel dibaot, naous dre un divigad loc'hadel muiet e gwizienn an izili hag ur skuizhadusted o tennañ da hini ar viasteniezh, kevret alies gant steuz an damougoù a-stirenn ha strafuilhoù ar santout, devoudet gant tolc'had raksinapsel an treuzkas nervenn-kaher a-geñver gant an unanantikofoù kaeler d'an ionganou kalkiom, anadenn lakaet a-wel gant ar c'hahervarrwezañ ; sellet e vez evel ur seurtad nervennaoued lezhanweel o tarvezout e-kerz kankroù ar bronkez ; gwellaet e vez an azonou dre arloañ fraouadoù tredan arredoet herrek.

lame

• *canal dans le limaçon entre la lame spirale et la lame des contours* kanol er velc'huedenn etre al lavnenn viñsek askornek hag ar ganol viñsek • *desquama-tion lamelleuse* gourc'hennadur lavnek • *pe* lavnennek • *élimination sous forme de lamelles de certaines parties nécrosées* ezvevrennadur parzhioù marvennet e rezh lavnigoù • *kératoplastie lamellaire* kornsaeatelviñ lavnennel • *lame basale des capillaires* lavnenn diaz ar c'horrwazhied • *lame basale du placenta* haen diaz an dorzhienn • *lame criblée de l'ethmoïde* lavnenn groueriek ar sileg • *lame limitante antérieure de la cornée* lavnenn vevennus araok ar gornsaë • *tissu constitué de lamelles osseuses* gwiad amparet gant lavnennou eskern.

lamine ◇ **lamin** ◇ **lamin g.** Edañvenn oc'h amparañ ur rouedad loet war dalbenn diabarzh koc'henn kraoñell ar c'helligoù.

laminine ◇ **laminin** ◇ **laminin g.** Glikoprotein glenañ, elfenn barzhiat en diazkennenn ma c'hourvez ar c'helligoù epitelet.

laminectomie ◇ **laminectomy** ◇ **lavnennezevañ** Dazbidañ un pe lies lavnenn gwareg vellenn en un tu pe en daou du warbenn dirazek kanol ar mellkein hag an endalc'had anezhi (mel a-livenn, lost marc'h), gwezh dewerc'het en holl azoniadoù amwaskel (isvoll kanol an dargeiz, diskogadoù, drailhoù askorn, pilhonogadoù).

laminopathie ◇ **laminopathy** ◇ **laminnaoued g.** Anvad rumm an anaezioù e dianlen un dargenad a'r c'henenn o vonegañ *laminou* 'zo ; darvezout a ra gant an oadourion yaouank e rezh un tizhad er c'higennoù atelel hag er c'haer kalon (kalongaherad grevus gant usvoll, migorvez ha mire) ; en o zouez e renker seurtadoù 'zo eus kleñved Emery-Dreifuss, eus azoniad Köberling-Dunnigan hag eus ar progeria.

lanatoside ◇ **lanatocide** ◇ **lanatozid g.** Heterozid kalonusreer douhennet eus *Digitalis lanata* (sl. *digitale*).

Lancaster : épreuve de ~ ◇ **Lancaster's test** ◇ **prouad g. Lancaster** Hentenn diurnat ha dezrannañ ar sezioù lagadloc'hadel, oc'h arverañ ur skramm murel tezellet, gwerennoù livek ha pokoù luc'h.

Lance et Adams : syndrome de ~ ◇ **Lance-Adams syndrome** ◇ **azoniad Lance-Adams** Empennaoued anoksek e dianlen un arsav kalon, erzerc'h dre gahergridoù.

lancette ◇ **lancet** ◇ **lañsetez b.** Ardivink surjaniel a oa ouzh e ober ul lavnenn blat 3 cm hed, plat, begek, troc'hus war an daou du, gwarezet gant div blakennig heloc'h, a arvered da ziwardañ, vaksinañ, skarigañ.

(-)lanc-

• *douleur lancinante* laur berius • *élanements paroxystiques* pistigoù grezvarrek • *fourmillements, élanements, brûlures des extrémités* kemenerion, berioù, loskadurezh en eizhaennoù • *mouvements de projection, de lancer, de torsion des membres* fiñvoù bannañ, stlepel, gweañ an izili • *relancer la surrénale après une corticothérapie prolongée* azluskañ an uslounezhenn goude ur c'haengurañ hirbad.

Landis : épreuve de ~ ◇ **Landis's test** ◇ **prouad Landis** Prouad amkanet da andalañ heforzhded ar c'horrwazhied, anezhañ dec'han an dassav e gwazhiennoù ur vrec'h hag, a-benn 30 min, erlemel gwad e pep hini eus an div vrec'h ha keñveriañ, en daou standilhon, feur an hemati, an hemoglobin, ar protidoù hollel, ar c'heñver albumin-globulin, douhennad sec'h ar plasma hag ar gwad hollel ; dre geñveriañ an disoc'hoù e jeder ar fuad dour ha proteinoù c'hoarvezet a-dreuz speurioù korrwazhied ar vrec'h dindan dassav.

Landolt : anneau de ~ ◇ **Landolt's ring** ◇ **gwalenn Landolt** Gwelrzhenn o c'hoarvezout eus ur walenn voulc'h (sl. *optotype*).

Landouzy-Dejerine : type facio-scapulo-huméral d'atrophie musculaire de ~ ◇ **Landouzy-Dejerine atrophy** ◇ **isteñv kaherel Landouzy-Dejerine** Kahernaoued hêrezhel treuzkaset er mod trec'hek aotozomek, anezhañ ur seurtad miopatiezh

kentael argammedek o tedreñ dre resmiadoù war hir amzer; deraouiñ a ra e-tro an oad a 3 pe 4 bloaz dre isteñv kigennoù an dremm ha, da heul, tizhout kigennoù gouriz an ezel krec'h ha gouriz an izili krec'h; dibaot e vez gwazhet an izili traoñ (sl. *myopathie, myopathie primi-tive progressive*).

Landowski : triade de ~ ◇ **Landowski's triad** ◇ **triadezh b. Landowski** Teskad an tri azon naouus da gleñved Recklinghausen : yoc'hennou a 'r c'hroc'hen, yoc'hennou a 'n nervennoù, brizhennoù livegat a 'r c'hroc'hen.

Landry : maladie ou syndrome de ~, leucomyélie ascendante, paralysie ascendante aiguë ◇ **Landry's palsy** ◇ **kleñved pe azoniad Landry, gwennvelfo g. askennus, seizi askennus, seizi Landry** Azoniad naouus dre ur seizi gwak o teraouiñ en izili traoñ, oc'h aloubiñ prim ar c'hef, an izili krec'h hag ar gouzoug, marvus dindan un nebeut devezhioù dre strafuilhoù analadel ha kalonel; en ervez da zarvezout e kerz nep anaez o tizhout an neuron trobarzhel : louetvelfo araok lemm, liesnervennfo, poreoù diseurt, h.a.; hiziv e reer eus seizi Landry ur furm lemm eus liesgwriaziennfo Guillain-Barré, hep tizhad ar mel.

Lane : bride de ~ ◇ **Lane's band** ◇ **nask g. Lane** Nask oc'h amwaskañ hag o kliniañ diouzh ur c'horn lemm pe lemmoc'h kilbleg diwezhañ ar glunegenn, lodek alies en argerzh an divilhennfo henek gant trosac'hennfo.

Lane : maladie de ~, érythème palmaire héréditaire de ~, syndrome des paumes rouges ◇ **erythema palmaris hereditatum** ◇ **kleñved Lane, eritem hêrezhel an daoubalv, azoniad an daoubalv ruz** Anaez treuzkaset er mod trec'hek peurliesañ, oc'h anadiñ ken abred hag ar c'hanedigezh, naouus dre un eritem ruz kel, lufirus, lec'hiet er gourbozennoù hag er goubozennoù, e talbenn palvel ar bizied hag e lec'hiennoù harpañ an daousol, sellet peurliesañ evel ur seurtad angiom plaen.

Lange : maladies ou syndromes de ~ ◇ **1 typus amstelodamensis 2 Bruckde-Lange disease, Cornelia de Lange's syndrome** ◇ **1 typus amstelodamensis 2 kleñved Bruck-de-Lange** 1 Seurtad migornvideñv naouus dre ur gorrded gant korrvleñchegezh, disneuziadoù an dremm (tal argouc'h, gwriazienn ar fri arblat, divgarvan balirek, gaved isweek), dilerc'hegezh vred, usvent an avu hag ar felc'h, kreofiegezh, a-wechoù bizanskar hag argrommed ar pempet bizied; peurliesañ e tarvez ar marv e-kerz bloavezhioù kentañ ar vuhez. 2 Azoniad ganedigel o tizhout ar magadelled, naouus dre usteñv ar c'higennoù, direzhioù ampikernennek hag un divig bredel, a-geñver gant anafoù kammneuziad el empenn (er rizeneg pergen).

Langerhans : cellule de ~ ◇ **Langerhans cell** ◇ **kellig Langerhans** Kellig dentritek bezant e haen spernek an epiderm, dindan gevarguz c'hoazh he orin hag he arc'hwel; evit aozerion 'zo e teverfe eus ar melanokit, evit re all e ve anezhi ur seurtad makrofag o tasperzhiañ en ervezhioù hangaeel diwar goust o arc'hwel fagokitañ.

Langerhans : îlots de ~ ◇ **Langerhans islets** ◇ **enezigoù l. (b.) Langerhans** Tolpadoù bihan kelligoù enborc'hat, gwazhiedet ha nervaouet puilh, strewet e-barzh flipezennoù an ilgreiz, teir rizhenn anezho : β o vorc'hañ an insulin, α pe $\alpha 2$ o vorc'hañ ar glukagon, $\alpha 1$ pe δ ar somatostatinañ.

langes bleus : syndrome des ~ ◇ **blue diaper syndrome** ◇ **azoniad ar pakoù glas** Azoniad familhel dibaot o kevredañ gwadusvec'h kalkiom, nefrokalkinoz ha troazhindikanegezh, oc'h anadiñ ken abred hag ar c'hanedigezh dre un isvent savderpouez, poreadoù diseurt hag ar goustivadur; glas e vez mailhurenn ar babig da heul oksidatur an indikan ezvevennet a-fonn en troazh dre benn misug pervezel un amindrenkenn, an triptofan.

langue ◇ **tongue** ◇ **teod g.** Organ hirgelc'hiek loet e parzh traoñ kavenn ar genoù, o c'hoarvezout, en adreñv, eus ur wrizienn fest stag ouzh an ankoue, an askorn uheñvel hag ar c'haved hag, en araok, eus ul lodenn heloc'h, ar c'horf; e dalbenn krec'h pe kein zo warnañ begennoù an tañva stalet e stumm ur V digor war raok; dindan e dalbenn traoñ emañ ar poell; kengej emañ e ribloù kostezel en e veg; oc'h ober an dolzenn anezhañ ez eus 17 kigenn nervaouet gant an IXt, an Xt hag an XIIe re nervennoù a-glopenn; organ an tañva, e kemer perzh el lonkañ hag er mouezhparañ.

langue de perroquet ◇ **parrot's tonge** ◇ **teod peroked** Teod sec'h, garv, a stader er stadoù tifek.

langue framboisée ◇ **strawberry tongue** ◇ **teod flamboezenn** Arvez an teod da bevare devezh eksantem ar skarlegenn; aet ar stloagenn divarnañ e vez ruz kel e dalbenn krec'h ha houpet e vegennoù.

langue fuligineuse ◇ **barred tongue** ◇ **teod huzilennek** Teod sec'h, warnañ ul lindrad arzu (huzilenn), stadet e-kerz an tifoid.

langue plicaturée ou scrotale ou fissurale ◇ **plicated or scrotal or fissured tongue** ◇ **teod plegaouek pe gousac'hek pe siliennet** Mideñv kevret hogos bepred gant kammneuziadoù all eus an dremm hag ar genoù, anezhañ ervennoù diahed don ha begennoù kabellek.

lanugo ◇ **lanugo** ◇ **lanugo g.** Dumed munut war gorf ar grouell adalek an 33t sizhunvezh brazezed, o steuziañ a-raok ar c'hanedigezh.

laparocèle ◇ **gastrocele, laparocèle** ◇ **torogad g.** Avelenn dre ur poent eus spur ar c'hof estreget ar gwalennoù morzhed ha barlenn (sl. *éventration*).

laparoplastie ◇ **laparoplasty** ◇ **toratelviñ** Dazbidañ an amwiskadoù eus spur ar c'hof o kouezhañ e rezh un davanjer a stader gant borreion treutaet 'zo.

laparochisis ◇ **laparochisis** ◇ **laparoskiziz g.** Diouer diorreadur spur ar c'hof en ul lec'hienn estreget ar begel, e raklen an eztorañ gant ar vagadell.

laparoscopie, cœlioscopie ◇ **laparoscopy** ◇ **torengweliñ, torwerañ** Imbourc'hiñ gweledel kavenn ar c'hof (sl. *cœlioscopy*).

laparotomie ◇ **laparotomy** ◇ **torenbenañ** Digeriñ surjaniel spur ar c'hof hag an ampelenn.

laparo-thoraco-phrénotomie ◇ ◇ **tor-brusk-meginenbenañ** Diren surjanel un ogad eus kouc'hell gleiz ar gelc'hspourenn; e ziraez a reer dre hent kofel ha, diouzh ret, dre hent bruskel, dre faoutañ ar gelc'hspourenn tre betek igorenn an ogad.

lardacé ◇ **lardaceous** ◇ **hoc'hgennek** aa. A-zivout ar gwiadoù heñvel ouzh tonenn ar c'hig sall.

larmoiement paroxystique ou **larmes de crocodile** ◇ **syndrome of crocodile tears** ◇ **azoniad an daeraouiñ grezvarrek** pe **an daerouñ krokodil** Borc'hañ daerouñ paot, untu, o tarvezout dre varradoù da geñver ar chaokat; heuliad a-wechoù da seizi an dremm, pa zehent ar gwiennouñ nerval, en ur adc'henezhañ, hebiou d'ar wagrenn gilvoc'h etrezek gwagrenn an daerouñ.

Larrey : **signes de ~** ◇ **Larrey's signs** ◇ **arouezioù Larrey** 1 Laur kriz e par ar jurtad kroazell-klun gant gouzviaded al lezkroazellost pa azezont trumm war un dalenn galet. 2 Arouez ameeun torr al lestr : dre skarat an eskell klun e tec'haner laur e par al linennouñ torr.

Larrey : **tétanos dysphagique de ~** ◇ ◇ **tetanos brelonkek Larrey** Furm detanoz naouus dre vuiegezh an dargrezañ er c'hargadenn ha dre greñvder ar brelonk hag an trec'hwezh.

Larsen : **syndrome de ~** ◇ **Larsen's syndrome** ◇ **azoniad Larsen** Teskad kammneuziadoù, anezho uslaosk ar stagelloù, disvelladoù niverus, mineuz ar fas gant arblated lodenn grenn an dremm, andlid ar stavn ha skarlagadagezh, troad potin, a-wechoù kehentad etre-kofigoù ha skorted kreskiñ.

larva currens ◇ **larva currens** ◇ **larva currens** Erzerc'had kroc'henel diwezhat an anguilluloz o tinodiñ 5 pe 6 vloaz goude derouñ an erialerezh, dec'hanet gant emdizh gouskoev larved *Strongyloides stercoralis* e-barzh un epiderm kizidikaet, bezant alies en dro d'ar groazlez, o tilec'hiañ dillo e rezh hersadoù ruz balirek, debonus; kevret alies gant poanioù kof hag un eleozinofil uhel (sl. *anguillulose*).

larva migrans cutanée, **larva reptans**, **dermatite vermineuse rampante**, **pseudomyiase rampante**, **dermatitis linearis migrans** ◇ **cutaneous larva** b. **migrans**, **Lee's disease**, **creeping disease** ◇ **larva migrans kroc'henel**, **kroc'henfo astuzien skrapmus**, **kleñved Lee** Anafoù kroc'hen aremstlej, dilec'hiat ha debonus, e rezh un andenn arruz ebarzh an amwiskadoù ensiladek hag eritematus, e dianlen al loc'hadur dindan ar c'hroc'hen eus larved amprevaned (gwirviiaz) pe nematod (gaouviiaz) e vez ul loen an ostiz spesadel anezho hag int hentbac'hat en den.

larva migrans viscérale ◇ **visceral larva migrans** ◇ **larva migrans flugezel** Azoniad naouus liesañ dre un eleozinofil uhel padek, dec'hanet gant larved arvevaded loenel hentbac'hat en den : askariz peurliesañ, ankilostom ar c'hi a-wechoù (sl. *Löffler* : *syndrome de ~, toxocarose*).

larvé ◇ **larval**, **larvate** ◇ **gweennet** aao. A-zivout ur c'hleñved oc'h anadiñ gant doareoù ur c'hleñved all, sk. : *terzhienn weennet*, furm baludegezh ma lez an derzhienn he lec'h gant un erzerc'had all (linadell, nervost) oc'h argizañ dindan wered ar c'hinin.

NOTENN : Ankewer eo arver Gl. *larvé* er c'hemeradur "skañvoc'h, blinoc'h".

laryngectomie ◇ **laryngectomy** ◇ **garloc'hennenezvenañ** Lemel surjanel ar c'harloc'henn a-bezh pe a-zarn.

laryngée : **crise ~** ◇ **laryngal crisis** ◇ **gwaskad g. garloc'hennel** Barr migañ gant damvougadur ar vouezh hag ar paz, kinnig vaganiñ hag a-wechoù kouezhañ, o tarvezout e-kerz an tabez (sl. *ictus laryngé*).

laryngite ◇ **laryngitis** ◇ **garloc'hennfo** g. Anvad rumm tanijennoù lemm pe henek ar c'harloc'henn.

laryngite striduleuse ou **sous-glottique aiguë**, **asthme de Millar**, **fauxcroup** ◇ **stridulous** or **subglottic laryngitis**, **pseudocroup** ◇ **garloc'hennfo gwic'hus** pe **endan-darzh**, **gaougroup** g. Seurtad garloc'hennfo a'r vugale, naouus dre varroù migañ, kaouadoù paz raouliet, skiltrus, o tarvezout en noz hep daralladur ar stad hollek.

laryngocèle ◇ **laryngocele** ◇ **garloc'hennaervozhell** b., **garloc'hennvozhell** Yoc'henn aezhel ar gouzoug diwar un ogad eus glaourgenn ar c'harloc'henn.

laryngofissure, **laryngotomie totale** ◇ **laryngofissure** ◇ **garloc'hennrannañ**, **garloc'hennenbenañ hollel** Gwezh surjanel, anezhañ faoutañ diouzh an dalenn greizer, pe ar migorn skoed hepken, pe ar migorn skoed, an div liennenn dreist-ha danlec'hiet hag ar migorn lagadenn.

laryngographie ◇ **laryngography** ◇ **garloc'hennluniñ** Skinluniñ ar c'harloc'henn goude he demeraat.

laryngologie ◇ **laryngology** ◇ **garloc'hennouriezh** Studi ar c'harloc'henn hag an anaezioù anezhañ.

laryngomalacie ◇ **laryngomalacia** ◇ **garloc'hennvlodad** g. Gwakted lodenn grec'h ar c'harloc'henn e raklen stridor an nevezc'hanidi (sl. *stridor des nouveaux-nés*).

laryngopathie ◇ **laryngopathy** ◇ **garloc'hennad** b., **garloc'hennanaez** g. Anvad rumm anaezadoù ar c'harloc'henn.

laryngopharynx, **hypopharynx** ◇ **laryngopharynx** ◇ **gouc'hargadenn** b. Lodenn draoñ ar c'hargadenn loet etre an ankoue el laez ha geol an treizher en traoñ.

laryngoplégie ◇ **laryngoplegia** ◇ **garloc'hennseizi** g. Seizi hollel pe darnel eus kigennoù ar c'harloc'henn.

laryngoscopie ◇ **laryngoscopy** ◇ **garloc'hennwerañ** Daou vod garloc'hennwerañ a embreger : 1 ar g. *ameeun*, dre araez an ardivink a zo ouzhe e ober ur melezour bihan marc'het ouzher ur c'harenn hir (*laringoskop*). 2 Ar g. *eeun*, embreget e-kerz an dieraeziñ hollek a-raok an enpibañ briantel diwar-bouez ul luc'honi sanket er forzhioù analañ e penn un troad, o kevaraezañ sellout war eeun diabarzh ar c'harloc'henn.

laryngospasme, spasme glottique ◇ **laryngospasm** ◇ **garloc'hennandag g., tarzhandag g.** Barr migañ o teraouiñ dre un enanaladenn drouzous heuliet gant loc'hadoù anañ berr ouzh berr hag ul lankad harzanal ha dulaz, o tarvezout trumm gant ar magadelled alies da geñver ur c'hleñved lemm, dec'hanet gant dargrezañ plegoù ar vouezh, erzerc'had an detaniezh; an un anvadoù a lakaer war un darvoud eus an diereaziñ, anezhañ un dargrezañ tantel eus plegoù ar vouezh o virout ouzh an aer a enteñ er skevent.

laryngosténose ◇ **laryngostenosis** ◇ **garloc'hennivoll g.** Strishadur ar c'harloc'henn.

laryngotomie ◇ **laryngotomy** ◇ **garloc'hennenbenañ** Gwezhañ ur flañchadenn hir pe hiroc'h war ar c'harloc'henn diouzh an dalenn greizer; kemm a lakaer etre ar *g. hollet* (sl. *fissurotomie*) hag ar *g. darnel*, dewerc'het pe dreist ar migorn skoed (*g. dreist-skoed*, Gl. *l. susthy-roidienne*) pe dindanañ (*g. etre-lagadenn-skoed*, Gl. *l. intercricothyroïdienne*).

laryngotrachéobronchite ◇ **laryngotracheobronchitis** ◇ **garloc'hennbriantbronkezo f.** Tanienn diaser ar c'harloc'henn, ar vriant hag ar bronkez; Sz. *acute laryngo-tracheobronchitis* (*g. lemm*) a ra an Amerikaned eus an anaev anvet gant ar c'hallegerion *trachéobronchite fulgurante* (*briantbronkezo daredek*).

larynx ◇ **larynx** ◇ **garloc'henn b.** Aerganol ha pennañ organ ar mouezhparañ, loet e parzh araok ar gouzoug, a-is d'ar c'hargadenn, a-dreñv ar skoedenn, a-us d'ar vriant a gendalc'h ganti; enni daou bleg ar vouezh, dezhi kigennoù piaouel hag un atel ouzh e ober 4 re vigern kostezel arstalek (m. picherek, kernigaouek, gennheñvel, sezamek araok) ha tri migorn kreizer (m. an ankoue, m. skoed, lagadenn) (sl. *cartilage, corde vocale, glotte, hyoïde, laryngopharynx*).

Lasègue : signe de ~ ◇ **Lasègue's sign** ◇ **arouez b. Lasègue** Dre blegañ ar vorzhed war al lestr en ur zerc'hel ar c'har war astenn ez azlañser pe e c'hriizezer ul laur kriz er feskenn, kefleñvad o hilgenñ an nervenn hag o tiskuilhañ bezañs un nervost a-goazez.

lasek ◇ **lasek** ◇ **lasek g.** Gwreskanv diwar Sz. *Laser Assisted Epithelial Keratomileusis*, hentenn surjianerezh gouskugel dre laser, anezhi arloañ an hordenn luc'h ouzh epitelienn ar gomsae evit leiaat he c'hrommder hag e se an derez isstiwel, (sl. *lasik, photoablation de la cornée*).

laser ◇ **laser** ◇ **laser g.** Gwreskanv diwar Sz. *Light Amplification by Stimulated Emission of Radiation*, ec'hoder luc'h kevanlen, eleze luc'hfroumou diaser, untalm hag arunkoulz, loet er skalfad hewel pe en danruz, a c'haller bodellañ en un hordenn strizh stiet war ur poent resis : gant ar gremm dezouget e vez neuze dilaosket ur wrez uhel a zanvezer, diouzh an ezhomm, evit kaouediñ, skejañ pe aezhelaat; al *l.* zo dezhañ un arver yac'hadel e meur a ziskiblezh (lagadouriezh, garloc'hennouriezh, koazhadouriezh, benevouriezh, kroc'hen-ouriezh, gwazhiedouriezh).

laséothérapie ◇ **laser therapy** ◇ **lasergurañ, laseryac'haat** Prederiañ dre araev al laser.

lasik ◇ **lasik** ◇ **lasik g.** Gwreskanv diwar Sz. *Laser Assisted Intrastromal Keratomileusis*, hentenn surjianerezh gouskugel dre laser evit prederiañ an isstiwelioù argrenn, kalvezder arveretañ evit luc'hezvenañ ar gomsae, e amkan leiaat krommder ar gomsae dre arloañ an hordenn luc'h ouzh ar stroma anezhi (sl. *lasek, photoablation de la cornée*).

LASS ◇ **LASS, labile aggregating stimulating substance** ◇ **LASS** Danvezenn drombozeiat deveret eus ar prostagandin E2.

Lassen : méthode de ~ ◇ **Lassen's method** ◇ **hentenn Lassen** Prederiadur furmoù hirvelel al loutvelfo araok lemm ma sour ar strauilloù analadel, dre ar briantenbenañ, desezañ a-fest ur sont enbriantel amkanet da suc'hañ borc'hadennoù ar vriant hag ar bronkez, analerezh kalvezadel.

Lasseur-Graham Little : syndrome de ~ ◇ **Little's syndrome** ◇ **azoniad Lassueur-Little** Azoniad kroc'hen naouus dre gevreted un diwaoutad kleizennel kantet a 'r brigenn a rizh gaoubeliad, un diwaoutad ankleizennel a 'n divgazel hag a 'r c'haezour hag ul *lichen spinulosus* lec'hiet en divgazel hag en divskoaz.

Lasthénie de Ferjol : syndrome de ~ ◇ **factitious anaemia** ◇ **azoniad Lasthénie de Ferjol, amwad dezerc'hat** (A-zave da benndenn "Une histoire sans nom", ar gevellenn gant Barbey d'Aureville) Seurtad derc'hanaev e rezh gwadliñvoù diavenn hag arreat o tisoc'h en un amwad islivel gant ruzisvent ha houarnisvec'h.

latent ◇ **latent** ◇ **enkelat aa.** A-zivout ur c'hleñved a zo dianat e azonoù, pe un hadenn bezant er bevedeg hep erzerc'hañ; er ster-se e kaver ivez arveret *amguzh, eznaou* (Gl. *occulte, inapparent*) (sl. *infection, microbisme*).

latéralisation ◇ **lateralization** ◇ **handuekaat** Argerzh an diorreadur o tisoc'h gant piaouekaat an handuegezh.

latéralité ◇ ◇ **1 handuelezh b. 2 handuegezh b.** 1 Kemm arc'hwelel etre an daou ledkorf. 2 Trec'hegezh ul ledkorf a-fet arc'hwelioù bredloc'hadel ha bredskiantennel; astennet emañ an handuegezh, n'eo ket hepken da arc'hwelioù an izili krec'h, met da holl arc'hwelioù ar c'hemoned; a du 'rall ne vez ket unvan an handuegezh bepred evit an holl arc'hwelioù (ur c'hleziad a 'n izili krec'h a c'hell bezañ dehouiad a 'n izili traoñ).

latérocidence ◇ **lateral prolapse of the cord** ◇ **tuerload g.** E-kerz ar gwentloù, diskenn ezreol ar funig vegel pe un dom eus ar grouell etre penn ar grouell hag unan eus speurioù kostezel al lestr.

latérocilis ◇ **laterocollis** ◇ **tugamm g.** Seurtad pennngamm m'emañ ar penn stouet war gostez.

latérocubitus ◇ **lateral decubitus** ◇ **gourvez g. a-gostez, tuc'hourvez g.** Loadur ar c'horf astennet war e gostez (sl. *décubitus*).

latéroflexion de l'utérus ◇ **lateroflexion of the uterus** ◇ **tublegad g. ar grozh** Distummadur ar gozh, deun an organ o vezañ stouet war gostez endra van ar c'horf en e zurc'hadur reol.

latérogénie ◇ ◇ **tuload g. an elgez** **g.** Kammneuziad anezhi dilec'hiadur an elgez war gostez.

latérogathie ◇ **laterognathia** ◇ **tuload an aven** Disneuziadur un aven pa n'emañ ket kreiz gwareg an dent e-barzh talenn gemparzh an dremm ; pa c'hoarvez an ezreolded gant an aven grec'h e komzer eus **tuload ar garvan** (Gl. *latérogathie supérieure*) ; gant an aven draoñ, eus **tuload ar c'haved** (Gl. *latérogathie mandibulaire*).

latéroposition de l'utérus ◇ **lateroposition of the uterus** ◇ **tuload g. ar grozh** Dilec'hiadur a-vloc'h war gostez eus korf ar grozh.

latéropulsion ◇ **lateropulsion** ◇ **treuzkorzhañ, treuzkorzhad g.** Doug da gosteziañ pa vezer war sav pe war vale ; bec'h d'ar barkinsonieion adkavout o c'hempouez pa 'z int bet sachet war gostez.

latérotorsion ◇ **laterotorsion** ◇ **1 tunezad g. 2 turodañ, turodad g.** 1 Distummadur un organ o c'hoarvezout eus c'hweladur war gostez eus ul lodenn anezhañ. 2 C'hweladur war gostez eus ur voull lagad en dro d'he ahel asaezh (sl. *extorsion, intorsion*).

latéroversion de l'utérus ◇ **lateroversion of the uterus** ◇ **tuc'hwelad g. ar grozh** Stouadur ar grozh war gostez hep distummadur, ar gouzoug oc'h eilpenañ war-du ar c'hostez enep.

(-)/latér-

- *algie vasculaire latéralisée cranio-faciale* laur gwazhiedel al ledpenn • *anastomoses latérolatérale, terminolatérale* dasforzhañ tu-ouzh-tu, penn-ouzh-tu • *anévrisme cardiaque latéral* darvoll kostezel ar galon • *anomalies bilatérales du fond d'œil* ezreolderioù daoudou eus deun al lagad • *branche collatérale d'une artère* barr kengostezel un dalmerenn • *castration uni-, bilatérale* spazhañ untu, daoudou • *castration unilatérale* ledspazhañ • *circulation collatérale* amred kengostezel • *collatéral (parent)* kevelac'hadour • *controlatéral* a-eiltu • *décubitus latéral* gourvez a-gostez • *effet collatéral* amwered, miwered • *face latérale du veru montanum* tal kostezel turumell ar sper • *faisceau cortico-spinal latéral* strad pluskenn-livenn kostezel • *glissement latéral anormal que l'on peut imprimer au pied* rikladur ezreol war dreuz a c'haller goulankañ d'an troad • *hémianopsie latérale homonyme* ledangwel diavann unsko • *hérédité collatérale* hêrelezh kevelac'hadel • *homolaté-ral* a-gendu • *inclinaison latérale de l'extrémité d'un doigt* stouadur war gostez eus eizhaenn ur biz • *inclinaison latérale de la tête fœtale* kosteziadur penn ar grouell • *infarctus antérolatéral* angwazhiad raogkostezel • *ipsilatéral* a-gendu • *la colostomie est dite latérale lorsque l'ouverture colique est effectuée sur une face de l'intestin sans interrompre sa continuité* komz a reer eus kolonezforzhañ diadu pa vez digoret kostez ar vouzellenn hep serriñ an oaled • *latérobioscopie* fibroskop treuzvuk • *les cordons latéraux de la moelle* pañsoù kostezel ar mel • *lésion dégénérative bilatérale* anaf dic'henezhadel daouduek • *mettre en communication latéralement deux anses intestinales* kehentaat tuouzhtu daou gilbleg pervez • *négligence spatiale unilatérale* andeur ledegorel • *néphrectomie bilatérale* divlounezhezvenañ • *ligaments latéraux du genou* stagelloù kengostezel ar glin • *noyau vestibulaire latéral* gronn a-rakkambr kostezel • *orchidectomie bilatérale* divgellezvenañ • *ovariectomie bilatérale* divvierezezvenañ • *sinus latéral* god treuz • *sclérose latérale amyotrophique* skleroz kostezel kahesternevus.

lathyrisme ◇ **lathyris** ◇ **latiregezh b.** Pistriadur dre euvriñ bouedoù a zo enno bleud charoñs, a gaver e rannbarzhioù 'zo Azia, erzerc'h dre un treuzseizi dasstrizhek muiek.

latroductisme ◇ **latroductism** ◇ **latrodeketegezh b.** Azoniad e dianlen brazhad kevnid eus ar genad *Latroductus* ("intanvezed du") en ervez o binim da zec'han laurioù bruska ha kof, kaheostoù, dargrezadoù, seizioù ha betek ur c'hoempad.

Laubry-Pezzi : syndrome de ~ ◇ **Laubry-Pezzi syndrome** ◇ **azoniad LaubryPezzi** Kalonnaoued ganedigel naouus dre gevreted ur c'hehentad etre-kofigoù uhel hag ur skorted aortek o tarvezout ent eilvedel dre an desachad hag an troc'holid ebarzh ar c'hofig kleiz eus unan a 'r sac'helloù kornloarek.

Laubry-Soulié : syndrome de ~ ◇ **Laubry-Soulié syndrome** ◇ **azoniad Laubry-Soulié** Laur e diaz kleiz ar bruska diwar un hogennadur aezhenn er stomok pe ebarzh klin kleiz ar c'holon, stadet en deizioù da heul darvezadur un angwazhiad a 'r c'haheer kalon.

laudanum ◇ **laudanum** ◇ **laodanom g.** Tentur opiom arveret gwechall evel hezer pe dic'hoster.

Laugier : distension en cadre de ~ ◇ ◇ **dardenn g. sternvanek Laugier** Gloen ar c'hof sourus en daoustlezh pa vez antreizh er c'hilbleg sigma.

Laugier : hernie de ~ ◇ **Laugier's hernia** ◇ **avelenn b. Laugier** Seurtad dibaot avelenn a-vorzhed naouus dre ogadur ar pervez dre ar stagell c'houlloennek.

Laugier : signes de ~ ◇ ◇ **arouezioù Laugier** 1 (Sz. *Laugier's sign*) arouez oc'h erzerc'haat an torr eus penn izelañ ar werzhid, anezhi askennad stihon an kez askorn betek dont a-live, a-us zoken, da stihon an helmo. 2 Arouez eus torr endan-benn pe treuz-gouzoug an askorn morzhed ; e pleg ar varlenn ez anad ur c'hoefvadur bihan fery pe galet, diwar valirad an tamm diavaez. 3 Diver gwad dre ar skouarn pa vez torret ar garregenn. 4 Arouez antreizh ar vouzellenn voan : gloen kantet e rannbarzh ar begel, hep astenn d'an daoustlezh.

Laurence-Moon-Biedl-Bardet : syndrome de ~ ◇ **Laurence-Moon syndrome** ◇ **azoniad Laurence-Moon** Teskad azonou hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, o vodañ borrdor, luc'hsaefo livegat, alies dilerc'hegezh vred, angwe ganadel, usniver bizied ha, dibaotoc'h, ezreolderioù lounezhel, kalonel, nerval ; da orin boutin an azoniad e c'housseller anafoù er gouzerc'hvel hag er c'hougornenn.

LAV ◇ **LAV, lymphadenopathy associated virus** ◇ **LAV** Viruz goubaret e 1983 diwar c'hwarrennoù ar glañvourion gentañ bet deznaouet an haza warno, pimpatrom ur gevrennad nevez retroviruzoù denel, gougevret dezho ar VIHAD (HIV, VIH), gwezher an hangaezvig arzeuat (haza, aids, sida) (sl. *immunodéficitaire acquis : syndrome* ~).

lavage broncho-alvéolaire ◇ **broncho-alveolar lavage** ◇ **engwelc'h g. bronkezlogigou** Dindan luc'hengweliñ ebarzhiñ 50 mL eus un dileizhad kengrennek 9 % kloridenn natrium er bronkez hag el logigou; arreet e vez ar gwezher lies gwech, al liñvenn o vezañ suc'h bet bepred da heul ha graet warni elfennadurioù kelligel, bakteriel ha kimiek.

lavage de l'intestin ◇ **enema** ◇ **engwelc'h ar pervez, enema g. -où** Ensinklañ liñvenn er youlc'h dre ur c'horzan sanket er fraezh, meur a amkan dezhañ : terriñ war ar goustivadur, karzhañ an oulennoñvoù, naetaat ar youlc'h en amboaz un imboure'h, ebarzhiñ un demeraer e sell da skinluniñ ar c'holon (*enema baritek*, Gl. *lavement baryté*).

NOTENN : Lakaet er-maez ar c'herienn Gl. *lavement baryté*, e tenn Gl. *lavage d'intestin* da gemer lec'h an termen Gl. *lavement* el lizheradur mezegel; istorel eo aet Gl. *clystère* hag e gendezneuziad Br. *krizal* (diwar hGr. *κλύστρον*), oc'h aroueziñ ken ar strinkell arveret da ziounit an engwelc'h pervez, ken an engwelc'h e unan; krediñ a ran kinnig Br. *enema* (diwar hGr. *ἐνema*) arveret hiziv e meur a yezh (saozneg, spagneg, h.a.) evit aroueziñ an engwelc'h pervez.

Lawrence : syndrome de ~, diabète lipoatrophique ◇ **Lawrence's syndrome** ◇ **azoniad Lawrence, diabet g. behinisteñvel** Anaev kennevidel kemplezh, dibaot ha grevus, dianav e arbenn, oc'h anadiñ d'ar c'hanedigezh pe e-kerz ar bugelvezh pe ar c'hrennoadvezh, naouus dre gevreted leidigezh hollek a 'r behin (*behinisteñvel*), usvent a zreistkarg a 'n avu o tredreñ etrezek ar c'hirrozh, gwadusvec'h a 'l lipid hag a 'n triglicerid ha diabet c'hwek insulinharzus anakidozel; azonou all dibaotoc'h : buanaat ar c'hreskiñ hag an azviñ eskernel, usvent an organoù genel, ar felc'h, ar galon a-wechoù (gant uswask talmerel), gourblevegezh ha livegad kroc'hen.

laxatif ◇ **laxative** ◇ **1 laoskus 2 laoskuzenn b.** 1 Oc'h aesaat diskarg ar bouzelloù. 2 Anvad rumm evit ar gwezherioù oc'h aesaat diskarg ar bouzelloù; hervez kreñvder o gwered e tiforc'her al *laoskuzennoù hegus* (Gl. *laxatifs irritants*) pe *spurjuzennoù* (sl. *purgatif*) hag al *laoskuzennoù flour* (Gl. *laxatifs doux*, Sz. *mild laxatives*), o reiñ lañs da drehentadur ar mongir, anhegus hag arveradus e-doug hir amzer.

laxatif mécanique ◇ ◇ **laoskuzenn dreloc'hel** Rumm aozadoù o werediñ war gantalc'h ar mongir, anezho al *laoskuzennoù eoulek* (Gl. *laxatifs huileux*) (eoul olivez, parafin, h.a.) o vuanaat rikladur ar mongir dre e voukaat ha dre lenkraat speur ar pervez, al *laoskuzennoù luvouezhek* (Gl. *laxatifs mucilageux*), ar *gwiennoù struzhel*, h.a. o kreskiñ ec'honad an oulennoù endalc'het gant ar c'holon (sl. *laxatif tensio-actif*).

laxatif sucré ◇ ◇ **laoskuzenn c'hwek** Seurtad laoskuzennoù flour, an anhegusañ e vent, o werediñ dre araez an treleizhiñ, evl ar glikerin, ar mel, kreudenn an tamarin, ar sabr eus gwez 'zo (onn, skav gwrac'h).

laxatif tensioactif ◇ **surfactant laxative** ◇ **laoskuzenn c'horrewezhus** Laoskuzenn dreloc'hel o werediñ dre leiaat an tennder gore, anezhi makrogoloù a dolz mol uhel, polimeroù digorvellek oc'h azderc'hel molekul dour dre ereoù hidrogen, o tec'han kresk ec'honad an dour e-barzh ar pervez.

laxatifs : maladie des ~ ◇ **laxative disease** ◇ **kleñved al laoskuzennoù** Azoniad a stader gant an dud a ra dreistarver henek a laoskuzennoù, naouus *ent klinikel*, dre un darc'hoal kilvers, diaezadoù, vaganadoù, skuizhadusted eizhañ, treutadur, gouliñvoù, gloen gof, barradoù tetaniezh, *ent vevoniel*, dre un alkaloz, ur gwadusvec'h klor ha kaliom, ur reñver ezvevennañ kaliom e riskl da zec'han un tizhadur grevus eus al loumez.

laxité ◇ **laxity** ◇ **laoskegezh b.** Diouer tennder ha harzder er gwiennoù kaherel, kenglenel pe dastennek; dardennadur ar stagelloù.

Lazare : signe de ~ ◇ **Lazarus sign** ◇ **arouez Lazar** (a-zave da Lazar, bet dasorc'het gant Jezuz) fiñvoù berr a orin melel o tarvezout er stad a varvempenn goude paouez ar gwenterezh kalvezadel.

Lazare : syndrome de ~ ◇ **Lazarus complex or syndrome** ◇ **azoniad pe kemplezh b. Lazar** 1 (Druss, 1967) strafuilhoù an noa hag ar realezh a stader gant gouziviaded bet dasorc'het goude un arsav kalon. 2 (Blanc & Routy, 1987) kañv diaraok buhez gant an dud nes o doa asantet da varv ur c'hankreg henek bet pareet; pe faezhoni ken eus an arouelerion, ken eus ar c'hlañvour a reont war e dro pa oar an holl n'eus spi pare ebet.

lazaret ◇ **lazaretto** ◇ **lazared g.** Diaezadur ma reoler bonanvez an dud o tegouezhout en ur mor- pe un aerborzh en arzont a vroeziou ma revez kleñvedoù tredizhus, ma lakaer ivez ar veajourion en dispell pa vez ret.

Le Fort : fractures de ~ ◇ ◇ **torrou Le Fort** 1 (Sz. *Wagstaffe's fracture*) torr diazerc'h dre zigrakañ an ufenn kostezel diwar nesaat a-helc'h hep dilec'hiañ. 2 *Torrou ar garvan a) krenn*, dre eskern ar fri, barr ar c'haved, an elvennegoù, *b) uhel pe disglennañ klopenn-dremm*, dre parzh uhelañ eskern ar fri, baleg a-dal ar garvan ha speur askorn ar pod lagad.

Le Veen : valve de ~ ◇ **Le Veen's valve** ◇ **trapig g. Le Veen** Skoev ampeleñ-kerc'henn evit andreugañ liñvenn un torliñv adfeilhus.

Leber : amaurose congénitale de ~ ◇ **amaurosis congenita of Leber** ◇ **steuzwel g. ganedigel Leber** Kleñved hêrezhel treuzkaset war ar mod enkilek, seurtad dic'henezhadur nervluc'hsaeel o tec'han an dallentez gant ar vabaned pe a-wechoù zoken an nevezc'hanidi.

Leber : angiomatose de ~ ◇ **retinal miliary aneurysm** ◇ **angiomatoz Leber, darvoll g. milier al luc'hsae** Kleñved naouus dre ar vezañs eus ul lieslezh darvolloù milier aront, ruz kel e-pign ouzh gwazhied al luc'hsae, gant naouezennoù

kelc'hennec o nodiñ tamm ha tamm en dro d'ar vrizhenn ha d'an darvoudoù; anaez untu o tedreiñ gorrek, rouestlet a-wechoù gant gwadliñvoù ar gwereg.

Leber : **maladie** ou **atrophie optique de** ~ ◇ **Leber's disease** ◇ **kleñved pe isteñv gweledel Leber** Nervennaoued gweledel drek-boull hêrezhel treuzkaset er mod enkilek reveeret, o tizhout ar wazed yaouank, naouus *ent klinikel* dre ul leiadur argammedek a 'r gweled gant skotom kreiz, *ent neuziadurel* dre ur gouliñv a 'r vegenn o tedreiñ etrezek an isteñv gweledel; ur c'hleñved an DNA mitokondriel eo.

Leber : **rétinite de** ~ ◇ **Leber's idiopathic stellate retinopathy** ◇ **luc'hsaefo g. Leber** Luc'hsaefo gouliñvek naouus dre naouezennou steredennek e par ar vrizhenn hag a-wechoù ar vegenn; eilvedel e vez a-wechoù d'ur poreadur hollek pe lec'hiek (dent, kevioù).

lécithinase ◇ **lecithinase** ◇ **lekitinaz g.** Enzim eus sug an ilgreiz o tourranñañ al lekitinoù e-kerz ar c'hoaz-hañ pervezel.

lécithine ◇ **lecithine** ◇ **lekitin g.** Glikerofosfat kolin kemplezh, danvezenn lipidel bezant peurgetket e-barzh an empenn hag ar melen vi.

lectine ◇ **lectin** ◇ **lektin g.** Anvad rumm danvezennou a orin struzhel en araez, *in vitro*, da zevoudañ neridigezh al limfokit hag an dreuzfurmidigezh e kelligoù blastel.

Ledderhose : **maladie de** ~, **aponévrosite plantaire** ◇ **Ledderhose's syndrome** ◇ **kleñved Ledderhose, lienstirennfo g. ar sol** Fibromatoz kentael pe eilvedel e lienstirenn ar sol, o tisneuziañ a-wechoù an troad war enkamm hag ar bizied war graban; azoniad kevret a-wechoù gant kleñved Dupuytren ha kleñved La Peyronie (argaledad mezell ar c'horfoù keviaoek) (sl. *maladie de Dupuytren*).

Lederer-Brill : **anémie** ou **maladie de** ~, **anémie aiguë fébrile** ◇ **Lederer's anaemia** ◇ **amwad Lederer, amwad lemm terzhiennek** Anaez a 'r vugale, o teraouiñ trumm dre un derzhienn uhel, ur c'hloppennad, c'hweladoù, naouus dre un amwad muiek gant elwenn, eleritroblast, gwadusvec'h ar bilirubin, gouikter, troazhemoglobinegezh (e dianlen ar gwadloezañ), a-wechoù felc'husvent ha gwadliñvoù; parañ a ra ent emdarzh dindan un nebeut sizhunvezhioù; koulskoude, e stader furmoù marvus e diouer mezegadur; e kevarguz e chom an ardarzh : ur rouestlad e ve d'ur poread a 'r fric'hargadenn, ar wikefre e ve paridigezh unanantikorofoù antieritrokit.

légionnaires : **maladie des** ~, **légionellose** ◇ **legionnaires' disease** ◇ **kleñved al legionerion, legionelloz g.** Pore a voe stadet an darreuziad kentañ anezhañ er Stadoù Unanet e 1976 etouez ezvrezeliaded an American Legion bodet evit o c'hendalc'h en ul leti eus Philadelphia; goude ur gounevezh a 2 da 10 devezh, e teraou trumm ar c'hleñved dre ur stad gripel gant skeventfo hag ez emastenn herrek e rezh erzerc'hadoù nerval (kloppennadoù, arluz), lounezhel ha koazhadel (darc'hoal koleravanek); marvus eo e 16 % eus an degouezhioù (e Philadelphia, diwar 4 500 perzhiad e voe 180 klañvour hag 29 marv); ar gwezher anezhañ zo ur vazhell Gram- dianav betek neuze, a voe badezet *Legionella pneumophila*, bezant er sanellegoù dour tomm hag en trevnadoù hinaozañ; dre an analañ e c'hoarvez an tredizhañ; abaoe ez eus bet hennadet spesadoù all *Legionella* (*L. micdadei*, h.a.), nemet e chom *L. pneumophila* kiriek da vuaniver an degouezhioù.

Leigh : **syndrome de** ~ ◇ **Leigh's disease** ◇ **azoniad Leigh** Anaez hêrezhel dic'henezhadel dibaot treuzkaset er mod aotozomek enkilek, empennaoued marvennus goulemm oc'h anadiñ er vugeliezh, naouus dre un ankedre, glizi, un instant, un divig bredel hag un dedreiñ marvus.

léiomyoblastome ◇ **leiomyoblastoma** ◇ **leiomioblastom g.** Yoc'henn eus ar c'haer levn, ouzh he ober kelligoù a neuz rizhellel.

léiomyome, liomyome ◇ **leiomyoma** ◇ **leiomiom g.** Yoc'henn guñv, ouzh he ober kelligoù kaer levn azv.

léiomyosarcome ◇ **leiomyosarcoma** ◇ **leiomiosarkom g.** Sarkom evodet eus ar gwriad kaherel levn.

leishmanie ◇ **leishmanid** ◇ **leichmanid g.** Anaf kroc'hen al leichmaniozoù, anezhañ elfennoù torosennek, ozvennek pe e stumm krugennoù likenvanek.

leishmaniose ◇ **leishmaniasis, leichmaniosis** ◇ **leichmanioz g.** Anvad rumm ar c'hleñvedoù devoudet gant protozoed flagellek eus ar genad *Leishmania*, en o zouez furmoù kroc'henel : *porbolenn ar Reter* (sl. *bouton d'Alep*), kiriek dezhi *L. tropica*, *porbolenn Bahia* pe *l. amerikan* (sl. *piambois*), kiriek dezhañ *L. brasiliensis* ha furmoù flugezel : *kala azar* (sl. *kalaazar*), *l. felc'hel ar vabaned* pe *kala azar ar vugale*, kiriek dezhañ *L. infantum*; deznaouet e vez al *l. kroc'henel* dre lakaat an arvevad war wel, al *l. flugezel* dre hematizazgludañ (sl. *hémoagglutination, immunosérologi-ques méthodes* ~).

Leitner : **syndrome de** ~ ◇ **Leitner's syndrome** ◇ **azoniad Leitner** Seurtad anrizek torzhellegezh o kevredin ur gwerblennus-vent strewek, un avufelc'husvent, ur bliñaat eus tri ac'had kelligoù ar gwad, un derzhienn hag ul lec'hiadur skeventel.

lemnisques (TA), rubans de Reil ◇ **lemnisci** (u. : **lemniscus**) ◇ **lietennou l. (b.)** Hordennoù rubanek gwiennoù santout, div anezho e-barzh ar c'hef empenn : *lietenn gostezel* ha *lietenn greizel*, o tehentiñ a-getep stlennadoù klevedel hag endonel.

Lenègre : **maladie de** ~ ◇ **Lenègre's disease** ◇ **kleñved Lenègre** Anaez dic'henezhadel, dianav e arbenn, o wazhañ daou varr an hordenn kentez-kofig, o tedreiñ gorrek hag o tec'han mireoù e rezh da gentañ tolc'hadoù barr ha da c'houde tolc'had kentez-kofig war gresk, danvez hemañ d'an tolc'had kentez-kofig henek ha da azoniad Adams-Stokes (sl. *Adams-Stokes : syndrome d'~*, *Lev : maladie de ~*).

Lenk : **triade de** ~ ◇ **Lenk's triad** ◇ **triadezh b. Lenk** Teskad tri azon pennañ ar gwatoñv tro-lounezh : loanost "e taol goustilh", arouezioù gwadliñvañ diabarzh, koeñvadur an dargreiz.

Lennox-Gastaud : syndrome de ~, variante du petit mal ◇ **LennoxGastaud syndrome** ◇ **azoniad Lennox-Gastaud, askenad g. an droug bihan** “empennaoued droukfellel ar vugale gant pikbaotoù gorrek strewek” (Gastaud ha Dravet, 1965); hollek ha peurliesañ tantek e vez ar barradoù, dazeilat gant dianennoù anrizek, berrbad hag argreskus o deroù hag o dibenn, anezho fatadurioù ar genskiant, rouestlet gant fiñvoù diarzoug hag antant, arreat hag o vont a-wechoù betek an aroad; stadañ a reer un divigad kfredel don hag alies un isteñv eus an empenn; ent nozografek emañ ar c’hleñved nes da azoniad an andagoù plegadel; etre ar barradoù e noter daralladoù rizhek eus an empennvarvezad : pikbaotoù gorrek strewek (sl. *absence, épilepsie généralisée, spasmes en flexion*).

lentes ◇ **nits** ◇ **nez** s. Viou al laou.

lenticône ou **lenticlobe** ◇ **lenticonus** ◇ **ferenn b. gernek, lentikon g.** Distummadur talbenn araok pe adreñv ar ferenn, brasoc’h o c’hrommder eget reol.

lentigine, lentigo, mélanome bénin, névus pigmentaire bénin ◇ **lentigo** (ls : **lentigines**) ◇ **lentigin g. lentigo g., melanom g. kuñv, nevuz g. livegat kuñv** Brizhenn vihan gell, ront, plaen pe a-vec’h balirek, amparet gant tolpadur ar melanokit er genveenn derm-epiderm, hep neridigezh antrevnek ar c’helligoù (e kemm ouzh an nevuz yud), oc’h anadiñ adal ar vugeliezh war an dremm hag an daouarn, anatoc’h en hañv ha gant an dud rous.

NOTENN : Mesk a noter en anvadoù gallek ar brizhennoù kroc’hen, aozerion oc’h ober an un anadenn eus Gl. *lentigo, lentigine, grain de beauté, tache de rousseur, mélanome bénin, névus pigmentaire bénin*, aozerion all o terc’hel an daou anvad-mañ diwezhañ ha lezel ar re all e piaou ar yezh voutin — en ur virout koulskoude an termen *tache de rousseur* evel kenster da *éphélide*. Da notañ ivez heñvel baoted e brezhonek : *brenn Yuzaz, dluzhach, lentilig, letin, plustrenn, brizhadur, brec’had* (mesk etre *brec’h* ha BrE *‘brih’, ‘bréh’*).

lentiginose ◇ **lentiginosis** ◇ **lentiginoz g.** Anaez kroc’hen naouus dre lentiginoù niverus a-strew; komz a reer a *lentiginoz puilhek* (Gl. *lentiginose profuse*) pa vez astennet d’ar c’horf abezh (sl. **LEOPARD : syndrome** ~).

lentiginose centofaciale ou **neurodysraphique** ◇ **centofacial lentiginosis** ◇ **lentiginoz kreiz-dremm** pe **nervvizlidel** Anaez hêrezhel a vod aotozomek trec’hek, oc’h anadiñ er vugeliezh, naouus dre un dispuilhad lentiginoù war lodenn grenn an dremm, kevret gant strafuilhoù nervvredel (droukfell, labanded, troziadezh) hag ezreolderioù kevandiñvañ an dlidelloù er penn, er mellkein hag er brusik (sl. *dysraphie*).

lentiginose périorificiale avec polypose viscérale ◇ **periorificial lentiginosis** ◇ **lentiginoz tro-igorennoù ha polipoz flugezel** Anaez hêrezhel a vod aotozomek trec’hek, o kevrediñ lentiginoù kentrat an dremm, peurgetket en dro d’ar muzelloù ha war glaourgenn ar genoù, ha polipoù pervez goulerc’hat, en ervez da zic’henezhañ e kankroù.

Lentivirus ◇ **Lentivirus** ◇ **Lentivirus g.** Genad virus gant RNA eus kerentiad ar *Retroviridae*, kiriek da gleñvedoù gorrek o dedro evel an haza (sl. *virus lents : maladies à ~*).

léontiasis ◇ **leontiasis** ◇ **leontiaziz g.** Usteñv amwiskadoù an dremm o reiñ dezhi un neuz leonek, e dianlen ul lec’hiadur eus al lovrezh lepromatus hag, a-wechoù, eus ar sifiliz.

leontiasis ossea ◇ **leontiasis ossea** ou **ossium** ◇ **leontiasis ossea** Osteoz usteñvus strewek, daoudu, o tinodiñ gorrek war eskern an dremm ha dreist holl war an divgarvan hag o wiskañ un neuz leonek d’an enebrezh; hogos bepred e vez an *l. o.* ur furn lec’hiek eus miwe stirek an eskern.

LEOPARD : syndrome ~ ◇ **LEOPARD syndrome** ◇ **azoniad LEOPARD** Kevreted kammneuziadoù hêrezhel arouezet dre ar gwreskanv diwar ar saozneg : *Lentigines, Electrocardiographic conductive defects, Ocular hypertelorism, Pulmonary stenosis, Abnormalities of genitalia, Retardation of growth, Deafness sensorineural*, eleze lentiginoz, ezreolderioù kalon (isvull skenventel, mireoù enkofigel dreist holl), skarlagadegezh, kamm-neuziadoù ganadel, dilerc’h kreskiñ, bouzarded ha labanded; anaez renket e stern an anaezadoù nervgroc’henel.

lépotherix, trichomycose vulgaire ◇ **lepotherix** ◇ **lepotherix g.** Anaez ar blev, goulakaet arvevadel, a stader dreist holl en divgazel hag en tachadoù ganadel; naouus dre fetisaennoù bihan o valirañ war strell ar vlevenn, alies a-ser gant c’hwezennou ruz.

lèpre ◇ **leprosy** ◇ **lovrezh b.** Pore trovanel, familhel alies, diwar vazhell Hansen (*Mycobacterium leprae*) a ento dre ar c’hroc’hen pe glaourgenn ar fri hag a dreled a-hed an nervvennoù trobarzh; hir eo ar gounervezh (etre 3 ha 5 bloaz); deraouiñ a ra dre anafoù ar c’hroc’hen (maelennoù ha krugennoù) diliveget pe gourliveget; abaoe Kendalc’h al Lovrezh (Madrid, 1953), e tiforc’her div furn : 1° *al lovrezh tuberkuloïdel* (rizh T), gant erzerc’hadoù kroc’hen amliesel, hevonn, diliveget, aneraezek pe uc’heraezek, tizhadoù nerval bras, tevadur an nervvennoù, laurioù, mieraez an eizhaennoù, isteñv kigennoù an daouarn, gouliezoù ha koll an oeñsoù (lovrezh muturnius), leidigezh kigennoù an dremm, gouliezoù ar gornsae o tifourkañ en dallentez; furn amdredizhus, kuñv ent keñverel he dedreñ, ganti un erwezhiad hangaeel bras, ur prouad yaek ouzh al lepromin; 2° *al lovrezh lepromatus* (rizh L), aloubus, strewek ha kemparzhhek he anafoù : maelennoù ruz, krugennoù, ozvennoù kouevrek (lepromoù), amhevonn, war c’horre un ensiladur don, sezet dreist holl war an dremm, tevaet he c’hroc’hen (sl. **léontiasis**), ivez en arzorn, en ilin, en ufenn, er glin; erzerc’hadoù all eo ar fronfo, ar c’hornsaefo; ne vez ket tizhet an nervvennoù kement hag er rizh T; grevusoc’h egetañ eo avat, tredizhus kenan; ent neuziadurel e stader un erwezhiad granulomatus strewek gant keurgelligoù ha bazheloù enkelligel; gwan eo an erwezhiad hangaeel : nac’hek eo ar prouad ouzh al lepromin; e rummadur Ridley ha Jopling (1966) ez arouezer TT hag LL an div furn “vlein”, I ar furmoù ansavelet, deraouel, hag ar furmoù etrebrelnel, argefin (sl. **borderline**) : BT (argefin tuberkuloïdel, Gl. *borderline tuberculoid*), BL (argefin lepromatus) ha BB (argefin argefin); gorrek e vez dedro al lovrezh, gant resmiadoù goulemm; pareadus eo dre ar c’himigurañ arzalc’het bloavezhioù pad (sulfonoù, sulfamidoù, rifampikin).

lépréchaunisme, syndrome de Donohue ◇ **leprechaunism** ◇ **leiprec'hanegzh b., azoniad Donohue** Teskad kamm-neuziadoù anvet dre zave d'al leiprec'han (Iw. *leipréchan*), korrigan eus ar folklor iwerzhonat, naouus dre ar gorrded, an neuz kozhard, ar greoñegzh, enebrezh ur gnom (daoulagad balirek ha skaret, fri arblat, atel ar fas skoanet, divskouarn hir ha loet izel), an isvezhur gant strafuilhoù al lonkañ, usteñv an divvronn hag an organoù genel, ar behinvidañ gant insulinharzusted ha gwadusvec'h insulin; marvus e vez an dedro dindan un nebeut mizioù; sellet evel un anaez hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek.

lépreux ◇ **1 3 leprous**, aa. **2 leper** g. & b. ◇ **1 lovr** aa., **lovrek** aa. **2 lovr** g. **-eion**, **lovrez** b. **-ed 3 lovrezhel** aa. **1** Gant al lovrezh. **2** Den gant al lovrezh. **3** A-zave d'al lovrezh.

lépride ◇ **leprid** ◇ **leprid** Erzerc'had kroc'heneal al lovrezh.

léprologie ◇ **leprology** ◇ **lovrouriezh** b. Diskiblezh vezegel o plediñ gant al lovrezh.

léprome ◇ **leproma** ◇ **leprom** g. Yoc'henn nozelek o tinodiñ en derm pe e tonenn ar glaourgennoù gant gouzviaded al lovrezh lepromatus.

lepromine ◇ **lepromine** ◇ **lepromin** g. Danvezenn antigenek dewerc'het dre vreviñ, silañ ha dishadennañ an nozel lovrek; ar prouad dre al l. (Gl. *épreuve à la l.*, Sz. *lepromine test*) a c'hoarvez a sankañ en derm 0,1 mL arluggenn lepromin : goude 4 da 6 sizhun e tinod ur grugenn gant klañvourion al lovrezh tuberkuloidel, o testiñ un argerzh difenn a-berzh ar gouzviad; nac'hek e vez ar prouad e tro al lovrezh lepromatus; yaek e vez a-wechoù gant an hiniannoù bonan.

léproserie ◇ **leprosy** ◇ **handrev lovreion, lovdrev** b. Lec'hienn (ti, ospital, kêriadenn) ma tredra ha ma prederier gouzviaded al lovrezh.

leptine ◇ **leptin** ◇ **leptin** g. Hormon proteek, 146 amindrenkenn ouzh e ober, borc'het gant an adipokit, o tiren an ilboued dre e werc'h war ar gouzerc'hvel, alese oc'h ober treutaat; boneget e vez gant ar c'henenn *ob*; un dargenad eus houmañ a zevoud ar borrdre, anadenn bet stadet war spesadoù logod 'zo.

(-) **leptique** ◇ **-leptic** ◇ **1 isreer** aa., **isreüs** aa. **2 isreer** g. **-ioù** **1** O c'hevennañ arc'hwelioù bevedel pe bredel. **2** Lia isreer (sl. *analeptique, neuroleptique, psycholeptique, thymoleptique*).

leptocytes ◇ **leptocytes** ◇ **leptokits**. Hemati ezreol dre o zanavded, o wiskañ a-wechoù war al lifradoù neuz ar c'helligoù rodell, distummadur a stader en amwad Cooley (sl. *annulocytes, cellule-cible*).

leptoméniges ◇ **leptomeninx** ◇ **menbilhons**. Pilhon blot, anezho ar bilhonenn danav hag ar bilhonenn gevniked.

leptoméningite ◇ **leptomeningitis** ◇ **menbilhonfo** g. Tanienn ar pilhon blot (tanav ha kevniked).

leptomorpe, leptóide ◇ **menstum** aa. A neuz lank, freilhennek, hirvoan.

leptosome ◇ **leptosome** ◇ **mengorf** aa. A gorfadur freilhennek (sl. *longiligne*).

Leptospira ◇ **Leptospira** ◇ **Leptospira** g. Genad bakteri nemetañ eus kerentiad al *Leptospiraceae*, korrvion heloc'h, e stumm troellennoù punet start, kromm o dibennoù, kleñvedus evit an den spesadoù anezho : *L. icterohaemorrhagiae*, arvevad boas ar razhed en treuzkas dre ar vouilhenn ha dre zour an neuñvlennoù (sl. *leptospirose ictérohémmorragique*), *L. grippityphosa* a zo logod ar maezioù ar mirva anezhañ, gwezher terzhienn ar parkeier (sl. *fièvre des marais*), *L. pomona*, gwezher kleñved ar voc'herion yaouank, *L. bataviae*, gwezher terzhienn ar rizegi, *L. australis*, kiriek da derzhienn ar c'horz sukr.

leptospirose ◇ **leptospirosis** ◇ **leptospiroz** g. Anvad rumm ar c'hleñvedoù devoudet gant al leptospir (sl. *Leptospira*); ar pennañ leptospirozioù denel zo anezho : al l. *iktergwadliñvel, terzhienn ar parkeier, terzhienn ar seizh devezh, kleñved ar voc'herion yaouank, terzhienn ar c'horz sukr*; deznaouet e vez al leptospirozioù dre araez gwadveizprouad Martin ha Pettit.

leptospirose ictérohémmorragique ◇ **leptospirosis icterohaemorrhagica** ◇ **leptospiroz iktergwadliñvel** Pore naouus dre ul lankad terzhienn kentañ, un ikter oc'h anadiñ en diwezh anezhañ, ha, goude un entremez angwrester, dre un eil resmiad terzhienn hep azon avuel; a-wechoù e stader arouezioù pillhoneal, un tizhad a 'l lounezh ha, dibaot en hinadoù kerreizh, gwadliñvoù; erguret e vez ouzh al l. i. dre ur vaksin.

leptotène ◇ **leptotene** ◇ **leptoten** aa. A-zivout kentañ pazenn eus profaz kentañ ar meioz, ma vez ar c'hromozom stummet tanav.

Leriche : **syndrome de ~** ◇ **Leriche's syndrome** ◇ **azoniad Leriche** Azoniad o kevredañ skuizhadusted eizhañ an izili traoñ gant isteñv o c'higennoù ha steuz ar pouz enno, kleññ spanaus, migevod, livrezh arwenn an divc'har hag an treid p'o gorreer, teskad azonoù a-geñver gant tromboz forc'h an aortenn .

Lermoyez : **syndrome de ~** ◇ **Lermoyez syndrome** ◇ **azoniad Lermoyez** Azoniad naouus dre un tolem trumm, grezvarrek, o paouez ken trumm all; e-doug ar barrad e steuz ar c'hleved hag e tistro en diwezh anezhañ; arzodet e vez d'ur reñver endolimf e dianlen un daraez, ur c'heuziad viruzel, allergkek pe mihangaeel.

Lesch et Nyhan : **syndrome de ~, encéphalopathie hyperuricémique** ◇ **Lesch-Nyhan syndrome** ◇ **azoniad Lesch-Nyhan, empennaoued g. urekwadusvec'hel** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod enkilek reveret, stadet war ar baotred hepken, naouus *ent klinikel* dre gevredet koreoatetoz, ustant kahelel, brelonk ha c'hweladoù, dilerc'hegezh vred, darwantusted ha tech d'an emvuturniñ (dantañ an divweuz, ar bizied an unan), *ent vevoniell*, dre uspar, gwadusvec'h ha troazhusvec'h an drenkenn urek; kleñved a-geñver gant diouer un enzim ret da gennevad ar purineier.

Leser-Trélat : signe de ~ ◇ **sign of Leser-Trélat** ◇ **arouez Leser-Trélat** Dispuilhad gwenaennoù soavredel niverus gant un henad, a erzerc'hafe ur c'hankr lec'hiet don.

lésion ◇ **lesion, injury, damage** ◇ **1 anaf g. 2 anaf, gloazad g.** 1 Darallad c'hoarvezet e doareoù korfadurel ha gwiadurel un organ dre zelanvad ur gwezher kleñvedel; dezverek an *naouedoù* eo, pe en ul lavar laosk, an anaezioù organel, a-gevenep d'an anaezioù arc'hwele (sl. *fonc-tionnel*); studi an anafoù eo an *neuzkleñvedouriezh* pe *naouedouriezh* (sl. *anatomie pathologique*). 2 Ent spisoc'h, e reer *gloazad* eus an anaf graet gant ur gwezher treloc'hel diavaez (sl. *blessure, contondant, contusion*).

lésionnel ◇ **lesional** ◇ **anafel aa.** A-zave d'un anaf.

lés-

- *anticorps capable de léser le foie* antikorf gwazhus d'an avu • *atteinte lésionnelle, "organique" naoued* • *drogues susceptibles de léser* drammoù en araez da anafañ, drammoù anafus • *léser le noyau cellulaire* anafañ kraoñell ar gellig • *lésion infectieuse* anaf poreel • *lésion focalisée, foyer lésionnel* annon anafel • *lésion pyramidale* anaf pikernennek • *lésions cérébelleuses hémisphériques* tizhadoù an hanterennoù ilpenn • *lésions vermineuses* anafoù ar preñv ilpenn • *lésions inflammatoires* anafoù foel • *signe lésionnel* arouez anafel • *stabilisation d'une lésion* stad disoc'hel un naoued • *souffle lésionnel* pe *organique* sourr anafel pe naouedel • *syndrome lésionnel au cours d'une compression médullaire* azoniad anafel e-kerz un amwaskad a 'r mel • *syndrome sous-lésionnel au cours d'une compression médullaire* azoniad endananafel e-kerz un amwaskad a 'r mel.

létal, léthal ◇ **lethal** ◇ **1 trankus aa. 2 trankus, marvus aa.** En araez da zevoudañ ar marv 1 a-berzh ur c'henenn pe ur stroll gen. 2 A-berzh un aozad, sk.: *doenad trankus pe marvus ul lia, un dram* (Gl. *dose létale d'un médicament, d'une drogue*) (sl. *overdose*).

létal : **facteur** ou **gène** ~ ◇ **lethal gen** ◇ **parenn b. pe genenn b. drankus** Genenn pe stroll gen bezant gant ar gerent hag o tevoudañ marv ar rizhell, ar grouell, an nevezc'haned pe ar vagadell.

létalité ◇ **lethality** ◇ **1 trankusted b. 2 trankusted, marvusted b. 3 marvusted 4 feur g. trankañ** 1 (Hiloniezh) bezañs, e glad hilel un hinienn, eus un pe lies genenn ouzh he anvevusaat. 2 (Pistriouriezh) perzh un aozad da zevoudañ ar marv. 3 (Kleñvedouriezh) tebegezh a zo gant ur c'hleñved da zegas ar marv. 4 (Reuziadoniezh) feur mervel/kleñvel, niver dre gant eus gouziviaded ur c'hleñved o vervel gantañ.

léthargie ◇ **lethargy** ◇ **morgoñv g.** Ent klasel, "hun don ha trebad a zeu ar c'hlañvour er-maez anezhañ pa gomzer outañ — respont a ra hep gouzout na kounaat ar pezh a lavar — ha ma adkouezh kerent ha ma taver" (Litttré); hiziv e seller ar morgoñv evel ur furm eus an darfell; notañ evelkent e reer a-wechoù gant *morgoñv Afrika* (Gl. *léthargie d'Afrique*) da envel kleñved ar c'houisk.

léthargique ◇ **lethargic** ◇ **1 morgoñvek aa. 2 morgoñvel aa. 3 morgoñvus aa.** 1 Gant ar morgoñv. 2 A-zave d'ar morgoñv. 3 O tevoudañ ar morgoñv — er c'herienn *empennfo morgoñvus* emañ hiziv arver mezegel nemetañ an adanv-se (sl. *encéphalite épidémique d'Econo-Cruchet*).

leucaphérèse ◇ **leukapheresis** ◇ **gwennedranñañ** Dispartiañ hag eztennañ al leukokit eus ar gwad, embreget ouzh furmoù 'zo a leukemiezh (sl. *cytaphérèse, érythraphérèse, plasmaphérèse*).

leucémie ◇ **leukaemid** ◇ **leukemid g.** Erzerc'hadoù kroc'hen oc'h anadiñ e-kerz al leukemiezhoù (kravien, ekzema, eritro-derma, nozel endan-kroc'hen).

leucémie, leucose (anvad dispredet) ◇ **leukaemia, leukemia** ◇ **leukemiezh b.** Anvad rumm un niver kleñvedoù yud, lemm pe henek, naouus dre neridigezh al leukokit en o c'hreizennoù parañ ha pa ve aloubet pe get ar gwad gant ar c'helligoù paret (leukemiezhoù mieloidel, limfoidel pe lemm; leukemiezhoù anleukemek, kelleukemek); pa vez distrujet ar mel eskern gant an argerzh neriñ, e kemer al *l.* neuz un agranulokitoz, un amwad pe un azoniad gwadliñvel; dervaat a reer deznaou al *l.* dre an ezwanañ klerenn; o soliañ war revoud leukemiezhoù loenel diwar virus, war dizoloadenn an transkriptaz gindro e-barzh kelligoù leukemek denel 'zo, e c'houlakaer orin viruzel ar leukemiezh denel.

leucémie aiguë, leucoblastose, leucomyélouse aiguë ◇ **acute leukaemia** ◇ **leukemiezh lemm** Furm leukemiezh o tizhout ar vugale yaouank dreist holl, herrek he dedro, marvus dindan un nebeut sizhunioù, naouus *ent klinikel* dre un derzhienn uhel, tufoz, genaouf, gwadliñvoù, koeñvadur argrenn ar felc'h hag ar gwerblennoù, a-wechoù ensiladur ar c'hroc'hen hag ar glaourgennoù, *ent vevoniel* dre ur gourelwenn (etre 60 ha 80 000) a zo an elfenn bennañ anezhañ ar c'helligoù andiforc'hek, hag un amwad muiek; dre an ezwanañ klerenn e stader neridigezh kentrat ar c'helligoù andiforc'hek er mel; hervez doareoù ar re-mañ e tiforc'her al *l. l. limfoblastel* pe *limfoidel*, ar re baotañ, a c'hounezur warno an didorrvezhoù hirañ hag a bareer an aliesañ, hag, etouez al *l. l. anlimfoblastel*: al *l. l. mieloblastel* pe *mieloidel*, ha, dibaot kaer, al *l. l. plasmokitel*.

leucémie lymphoïde chronique ◇ **lymphatic leukaemia** ◇ **leukemiezh limfoidel henek** Leukemiezh o tarvezout e tro an oad a 60 vloaz, naouus dre neridigezh ar gwiad limfoidel hag aloubadur ar bevedeg gant limfokit azv, hogos bepred eus ar rizh B, dibaot kaer eus ar rizh T, a ra etre 70 ha 99 % eus kelligoù ar gwad (50 000 ar gwadfeur anezho) hag an hanter eus kelligoù ar mel, kevret gant c'hwarrennoù hollek, avufelc'husvent, feur izel an immunoglobulinoù er gwad; goude ur prantad a lies bloavezh stabiled, e tedro d'ar marv dre an amwad, an olpladanou ha rouestladoù porel.

leucémie monocytaire ou **à monocytes** ◇ **monocytic leukaemia** ◇ **leukemiezh vonokitel** Leukemiezh lemm herrek he dedro, naouus dre aloubidigezh ar mel eskern hag ar gwad pe gant monokit yaouank, pe gant mieloblast ha monokit: furmoù mielomonokitel — ar re-mañ o wiskañ ur furm henek a-wechoù (sl. *leucémie myéломocyttaire*).

leucémie myéloïde chronique, leucose myéloïde ◇ **chronic myeloid leukaemia** ◇ **leukemiezh vieloïdel henek** Paotañ furm leukemiezh, naouus dre un usvent bras a 'r felc'h hag un usvent argrenn a 'n avu, ur gourelwenn etre 100 000 ha 300 000 oc'h angorzhañ an holl ac'hadoù leukokit, dreist holl ar granulokit eozinofil ha bazofil hag elfennoù yaouank na gaver ent reol nemet er mel; studi ar genrizh a laka war wel hogos bepred ar c'hromozom Filadelfia; en desped d'ar skin- ha d'ar c'himigrañ e chom an dedro marvus dindan dri bloaz (sl. *chromosome Philadelphia, myéломатозе, myéлоprolifératifs : syndromes* ~).

leucémie myélomonocytaire ◇ **myelomonocytic leukaemia** ◇ **leukemiezh vielomonokitel** Leukemiezh o tarvezout gant ar wazed e tro o 70 vloaz, naouus bepred dre un usvent eus ar felc'h a-wechoù eus an avu ha dre grugennoù hag ozvennoù kroc'hen; dre un olruz gant hemati yaouank, ur gourelwenn argrenn gant mielokit ha monokit; an dedro, marvus bepred, a c'hoarvez dezhañ bezañ hastet gant ar gwadliñvoù, ar poreadoù hag un dreuzfurmidigezh el leukemiezh lemm; ent nozografek e renker al *l. m. e-touez* an azoniadoù melneradel (sl. *myéлоprolifératifs : syndromes* ~), deskrivañ a reer *furmoù lemm a-gentizh, furmoù ar vagadell hag ar bugel* (sl. *leucémie monocytaire*).

leucémie à tricholeucocytes ◇ **hairy cell leukaemia** ◇ **leukemiezh trikoleukokitel, leukemiezh gant leukokit blevek** Gwadnaoued dibaot, grevus, o tizhout aliesoc'h ar c'houereved oadour, naouus *ent klinikel* dre an asikted, ar welved, ur felc'hus-vent muiik hag a-wechoù an usvent avu, *ent wadoniell* dre un olkelligoù bloc'hel (hemati, pladanoù, granulokit eozinofil dreist holl) hep tuadur d'an adc'henezhañ ha, naouuster dibarek, bezañs *trikoleukokit*, brasoc'h eget al leukokit, houpet diwarno ur greouchennad astennadoù protoplasm, oc'h ensilañ er mel eskern hag er felc'h; goulemm e vez an dedro, herrekaet gant resmiadoù gouliñvel ha poreel.

leucémique ◇ **leukaemic** ◇ **1 leukemek aa. 2 leukemeg g. -eion 3 leukemek aa.** 1 Gant al leukemiezh. 2 Gouziviad al leukemiezh. 3 A-zave d'al leukemiezh.

leucie ◇ **leucia** ◇ **leukiezh b.** Braster andennadel o tenaouiñ anglevad keñverel al lugern, sk. : brasoc'h leukiezh a vez gant ar melen eget gant ar gell.

leucinose, maladie du sirop d'érable ◇ **leucinosi, maple syrup disease** ◇ **leukinoz g., kleñved ar siros skav gwr-ac'h** Anaez kennevidel hêrezhel dibaot, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, oc'h anadiñ ken abred ha mizioù kentañ ar vuhez dre strafuilhoù koazhadel gant akidoz, ha direizhoù nerval el lonkañ, en analañ, en tant kahelel, glizi a-wechoù, o tedeñ dindan un nebeut mizioù etrezek un displeberadur kreudel ha bredel marvus, e dalc'h ezvezañs an enzimoù (dekarboksilazoù) o treluskañ dekarboksiladur an amindrenkennoù skoultrennek (leukin, valin, izoleukin, alloizoleukin); hogennet ar re-mañ er gwad, e vezont ezvevennet dre an troazh, o reiñ dezhañ c'hwezh ar siros skav gwrac'h pe ar sukr losket.

leucoagglutination ◇ **leucoagglutination** ◇ **gwendazgludañ** Dazgludañ ar c'helligoù gwenn.

leucoagglutinine ◇ **leucoagglutinin** ◇ **leukoagglutinin g.** Aglutinin bezant e gwadveizoù ezreol 'zo, en araez da zazgludañ al leukokit.

leucoaraïose ◇ **leucoaraiosis** ◇ **leukoaraioz g.** Tachadoù rouesadur ezreol strewek e steuñvenn wenn an empenn, dinoadur dre ar c'hwilerluniñ pe an dason gwarellel derc'hanel, naouus da anaezioù diseurt evel kleñved Alzheimer, an uswask talmerel hag ivez e-maez a nep taolenn glinikel (sl. *imagerie médicale*).

leucoblastes ◇ **leucoblasts** ◇ **leukoblast s.** Bongelligoù ac'had al leukokit, limfoblast ha mieloblast o tisoc'h anezho (sl. *cel-lules souches*).

leucoblastémie ◇ **leucoblastaemia** ◇ **leukoblastemiezh b.** Bezañs paoterek leukoblast ha kelligoù andiforc'hek er gwad, naouus d'al leukemiezh lemm.

leucoblastique ◇ **leucoblastic** ◇ **1 leukoblastel aa. 2 gwennac'hadel aa.** 1 A-zave d'al leukoblast. 2 A-zave d'an ac'had gwenn.

leucoblastique ou leucocytaire : lignée ou série ~ ◇ **leucocytic series** ◇ **ac'had g. leukoblastel pe leukokitel, ac'had gwenn, gwennac'hadel** Heuliad ar c'helligoù yaouank oc'h azviñ hag o neriñ en organoù parañ (organoù limfoïdel, ar mel eskern pergen) betek disoc'h gant ar c'helligoù gwenn oadour (leukokit pe kelligoù gwenn) (sl. *leucocytes, lymphocytaire : série ~, lymphoïde : système pe tissu* ~).

leucoconcentration ◇ **leucoconcentration** ◇ **gwendevc'hiañ** Kalvezder amkanet da studiañ elfennoù luniek ar gwad, anezhañ tronizhañ ar gwad bet kitratet ha loezañ haenad an hemati war-benn goubarañ al leukokit hag ar c'horfoù ezreol (a orin hanweel pergen).

leucocorie ◇ **leucocoria** ◇ **mabwenni g.** Gleur azgwenn a 'r mab lagad, a c'hell azonañ ur ferennlug, ur fibroz drekferenn, ur gliom enlagadel pe ur yoc'henn eus al luc'hsae.

leucocytes, globules blancs ◇ **leucocytes, white blood cells** ◇ **leukokit s., kelligoù gwenn** Kellig kraoñnellek eus ar gwad, tri seurtad anezho : ar granulokit, al limfokit, ar monokit.

leucocytes : test d'inhibition de la migration des ~ ◇ **leucocyte migration inhibition test** ◇ **prouad heudiñ emdizh al leukokit** Prouad amkanet da imboure'hiñ kizidikadur al leukokit (pe ar makrofag) ouzh un antigen; penn digor ur vrigerenn dall leuniet gant un arlugad limfokit a souber en ur gibanad metoù tiñvañ ouzhpennet dezhañ an antigen; goude 18 h e-barzh un tesaer da 37°C e stader o deus emdizhet al leukokit d'ar gibanad a-bezh pa nad int ket kizidikaet ouzh an antigen pe, en eneb, mard int kizidikaet, ez eo bet heudet o emdizh hag e chomont gronnet ekreiz ar giban en dro da benn ar vrigerenn; prouad hemañ a gevaraez erc'hwiliañ an hangae dre handizh kelligel (sl. *facteur inhibiteur de la migration (des leucocytes et des macrophages), hypersensibilité différée ou retardée : réaction d'~, immunité*).

leucocytes paresseux : **syndrome des** ~ ◇ **lazy leucocyte syndrome** ◇ **azoniad al leukokit diegus** Skorted arlezañ ha tregenkañ al leukokit neutrofil, kiriek da vuiaour an ardizh ouz ar c'heuziadoù bakteriel.

leucocytolyse ◇ **leucocytolysis** ◇ **gwennloezañ, gwennloez g.** Steuziañ pe dispenn ar c'helligoù gwenn er gwad, anadenn vonan pe gleñvedel.

leucocytométrie ◇ **leucocytometry** ◇ **gwenneriñvañ** Niveriñ ar c'helligoù gwenn ha jediñ ar feur anezho.

leucocytose ◇ **leucocytosis** ◇ **1 gwennriñv g. 2 gwennusriñv g., elwenn g.** 1 Feur al leukokit er gwad (ent vonan etre 4 000 ha 10 000/µl). 2 Reñver leiek ha tremeniat kelligoù gwenn er gwad pe en ul levrzenn.

NOTENN : N'eo ket unvan arver Gl. *leucocytose*; o vezañ ma oa engwezhiet en ur ster all an termen *leucémie*, e tivizas an aozerion reiñ da *leucocytose* ar ster hollek "feur al leukokit er gwad", ha luniañ an termenoù *hyperleucocytose* "reñver leukokit er gwad" hag *hypoleucocytose*, *leucopénie* "diouer leukokit er gwad"; aozerion 'zo avat a reas da *leucocytose* talvezout kement ha "reñver leiek ha tremeniat al leukokit" en ur amberzañ *hyperleucocytose* evit ar reñverioù muiek (e leukemiezhoù 'zo da skouer); kinnig a ran : Br. *gwennriñv* "feur al leukokit er gwad", *gwennusriñv* (pe *olgwenn*) "diouer leukokit er gwad" ha *gwennusriñv* pe *elwenn* "reñver leukokit er gwad", en ur ouzhpennañ diouzh ret Br. *gourelwenn* da aroueziñ ar feurioù uhel kenan (sl. *hyperleucocytose*).

leucocyturie ◇ **leucocyturia** ◇ **1 troazhwennegezh b. 2 troazhusriñv g. leulokit** 1 Bezañ leukokit en troazh. 2 Feur reñverek (dreist 10 000/min) al leukokit en troazhvorc'h; pa vez muiek, e komzer a *droazhlinegezh* (sl. *pyurie*).

leucodermie ◇ **leucoderma** ◇ **leukoderma g.** Anlivegad ar c'hroc'hen stadet e lies kleñved (skleroderma, lovrzh, h.a.).

leucodystrophie ◇ **leucodystrophy** ◇ **gwennvideñv g.** Seurtad skleroz empenn strewek, hêrezhel ha familhel, naouus, *ent neuziad-urel*, dre zarallard kenved ar mielin, marteze dre ziaraezded an neuroglia da gefleuniañ e arc'hwel mezhur; *ent klinikel*, dre zisleberidigezh ar bred hag amparadur argammedek ur pevarseizi dargrezadel gant barradoù tantel; darvezout a ra ar marv e termen un dedro dre ar fallezh, ar reuter ec'hempenned, an envedi don hag a-wechoù an dallentez hag ar vouzarded; deskrevet e vez ur furn vugel kentrat, ur furn yaouerel, ur furn oadourel hag ur furn c'houlerec'hat.

leucoencéphalite ◇ **leucoencephalitis** ◇ **gwennempennfo g.** Stroll anaезioù an nerved, naouus, *ent neuziadurel*, dre lijor-ennoù ledan divielinaat heuliet pe get gant skleroz hag erwezh gliel, lec'hiet e steuñvenn wenn an hanterennoù empenn, ar c'horf karnek, pañsoù ar mel hag, a-wechoù ivez, ar steuñvenn louet : ar bluskenn, gronnoù an diaz, an ilpenn; *ent klinikel*, dre azonoù a-geñver gant lec'hiadur an anafoù : strafuilhoù bred, direizhoù loc'hadel dasstrizhek, santadel ha skiantennel, strafuilhoù ilpennel ha rakkambrel, arouezioù uswak enklompennel; d'ober ar stroll-se ez a anaезioù liesseurt : ar *skleroz strewek*, o tizhout an nerved kreiz a-bezh, ar *sklerozioù empenn strewek*, ma vez skignet ent kemparzh an tachadoù divielinaat en hanterennoù empenn.

leucoencéphalite aiguë hémorragique ◇ **acute haemorrhagic leucoencephalitis** ◇ **gwennempennfo lemm gwadliñvel** Seurtad gwennempennfo naouus, *ent neuziadurel*, dre sez wazhiedel ha trowazhiedel an anafoù hag ar rizh foel anezho; *ent klinikel*, dre azoniadur gaouyoc'hennel alies, barradoù droukfell hag un dedro saezhus.

leucoencephalite sclérosante subaiguë ◇ **Van Bogaert's encephalitis** ◇ **gwennempennfo sklerozus goulemm** Seurtad gwennempennfo o teraouiñ argammedek gant ar vugale oadet etre 4 ha 10 vloaz, naouus, *ent klinikel*, dre un envedi don, un ustant hollek gant stroñsoù kridek hag un dedro herrek, etre 5 hag 11 mizvezh, etrezek ar fallezh hag ar marv; *ent neuziadurel*, dre zistruj ar mielin ha tizhadur argrenn gronnoù an diaz; e kraoñell hag e kitoplasm kelligoù ar glia e stader ebarzhennoù, anezho viruzoù ar ruzell; sellet e vez ar g. s. g. evel ur furn c'horrek eus an *empennfo ruzellel* (Gl. *encéphalite morbilleuse*).

leucoencephalopathie ◇ **leucoencephalopathy** ◇ **gwennempennaoued g.** Anvad rumm holl dizhadoù steuñvenn wenn an empenn.

leucome ◇ **leucoma** ◇ **leukom g.** Brizhenn wenn chomet war lerc'h ur gloazad pe ur c'houliez eus ar gornsaec.

leucomélanodermie ◇ **leucomelanoderma** ◇ **leukomelanoderma g.** Kenvezañs plakennoù kroc'hen us- hag islivegat, ganedigel pe kevredet gant dermatozioù 'zo (liken, sifilid tredeed, skingroc'henfo) (sl. *collier de Vénus*).

leucomyélie ◇ **leucomyelitis** ◇ **gwennvelfo g.** Tanienn pañsoù gwenn ar mel a-livenn.

leuconévaxite ◇ **leuconevaxitis** ◇ **gwennervegad g.** Anaez an nerved kreiz kantet er steuñvenn wenn.

leuconychie ◇ **leuconychia** ◇ **ivinisliv g.** Dislivadur darnel pe hollet an ivinoù a-geñver gant anaезioù diseurt.

leucopédèse ◇ **leucopedesis** ◇ **gwenndregenkañ, gwenndregenk g.** Tregenkañ al leukokit (sl. *diapédèse*).

leucopénie, hypoleucocytose ◇ **leucopenia, hypoleucocytosis** ◇ **gwennisriñv g., olgwenn g.** Diouer leukokit er gwad (sl. *leucocytose*).

leucoplasie, leucokératose ◇ **leucoplakia** ◇ **leukoplakiezh b., leukokeratoz g.** Anaez henek o wazhañ glaourgennoù warno epitelienn liac'hek haenek (er genoù : *plakenn ar vutunerion, plakenn berlezek ar freilhoù*, ha, dibaotoc'h, er c'hourzh, er gouin, er c'hwezhegell), naouus, *ent neuziadurel*, dre korninaat gorre an epiderm, *ent klinikel*, dre blakennoù arwenn pe opalek hepken; anaf en ervez da gankraat.

leucopoïèse ◇ **leucopoiesis** ◇ **gwennbarañ** Furmiñ al leukokit.

leucorrhée, pertes blanches ◇ **leucorrhoea, whites, fluor albus** ◇ **gwennaouez b., krozhver g.** Beradur glaourek pe glaourlinek arwenn pe melen arwer dre ar c'hourzh, diwar ur poreadur garvevel, arvevadel pe foueel.

leucosarcomatose ◇ **leucosarcomatosis** ◇ **leukosarkomatoz g.** Anaez yud naouus dre yoc'hennoù gwerblennel, lec'hiet er poullkreiz dreist holl, ha dre arouezioù gwadel al leukemiezh lemm limfoidel gant dassezioù niverus.

- leucosarcome** ◇ **leucosarcoma** ◇ **leukosarkom** g. Yoc'henn yud hevonn evodet diouzh ur gwiad gwennbarañ (gwerblenn, hueg, felc'h).
- leucospermie** ◇ **leucospermia** ◇ **sperwennegezh** b. Reñver leukokit er sper, a-geñver gant ur poread pe ur fo lec'hel.
- leucostase** ◇ **leucostasis** ◇ **gwenndassav** g. Tolpadur al leukokit er c'horrwazhied ma tazont ha ma furmont trombuzioù gwenn o skoilhañ an amred, e dianlen ur gourelwenn, *hollek*, da skouer e-kerz al leukemiezhoù leukoblastel lemm, pe *lec'hiek*, da skouer dre benn amskard un darn eus an dolzenn wad e-barzh un tiriad gwazhiedel, e raklen miarc'hwel organoù 'zo, skevent, empenn, lounezh, h.a. (sl. *cytaphérese*).
- leucotaxique** ◇ **leucotactic** ◇ **gwennamdizhel** aa. A-zivout amdizh al leukokit (sl. *chimiotactisme, cytotoxie*, La-09 172).
- leucotrichie** ◇ **leucotrichia** ◇ **blevisliv** g. Dislivadur ganedigel ar blev (sl. *canitie*).
- leucotriènes** ◇ **leucotrienes** ◇ **leukotrienoù** l. (g.) Hanteradoù an dreistkizidigezh hogozek dilaosket gant ar makrofag hag ar granulokit neutrofil dre zelanvad un enzym, al lipooksigenaz, gwezherioù ar bronkezstrishaat ha heforshaat ar gwazhied; deveret int diwar an drenkenn arakidonek, evel ar prostaglandinoù a ra ganto stroll an ikozanoïdoù.
- NOTENN : I – Evezh ouzh tri c'hemeradur ar c'hedrannoù Gl.Sz. *-leuc(o)-*, Br. (*g*)*wenn-*, pa arouezont gwech kelligoù eus gwad, gwech ur steuñvenn eus an nerveg, gwech al liv gwenn. .
- NOTENN : II – Ar skrivad *-leuc-* a gaver peurliesañ e saozneg Breizh-Veur (British English), endra reer gant ar skrivad *leuk-* e saozneg ar Stadoù-Unanet (American English).
- Lev** : **maladie de** ~ ◇ **Lev's disease** ◇ **kleñved Lev** Tolc'had kentez-kofig henek eilvedel da anafoù skleroz razek e kef hag e forc'h an hordenn gantez-kofig (sl. *Lenègre* : *maladie de* ~).
- Levame** : **orthèse de** ~ ◇ **Levame's orthesis** ◇ **amsteudell** b. **Levame** Astell arloet ouzh kein ur biz evit e zerc'hel war astenn (sl. *attelle*).
- levée de corps** ◇ ◇ **sav** g. **korf** Gwezh lezennvezegel, anezhañ diouzh un tu arsellin ur c'helan war al lec'h ma 'z eo bet kavet, diouzh an tu all arglask olioù eus ur c'houl ha roudoù eus ur muntre (sl. *examen de corps*).
- lévocardie** ◇ **laevocardia** ◇ **kleizwariadur g. ar galon** Dilec'hiadur ezreol ar galon d'an hantervrusk kleiz; kemm a lakaer etre ar 1) *k. arzeuat* (pe *kleizc'hweladur*, Gl. *sinistroversion*), pa vez disvountet ar galon gant ur fennad krezoù pe ur yoc'henn sezet a-zehou, pe pa vez desachet war gleiz gant glenelloù krezoù, skleroz ar skevent pe ul logigisvoll sezet a-gleiz; 2) *k. ganedigel*, milakadur dibaot kenan, ar galon o vezañ en he loadur kleiz boas, ar peurret eus ar flugez o vezañ tuginet (*situs inversus*); kevret e vez bepred ar *k.* gant kammneuziadurioù kalon all (sl. *dextrocardie*).
- lévocardiogramme, lévogram** ◇ **laevocardiogram** ◇ **kleizkalonwezad g., kleizvarwezad g. (kalon)** Rann eus ar c'halon-varwezad oc'h erzerc'haat, ent derc'hek, gwerederezh ar c'hofig kleiz.
- lévogramme** ◇ **laevogramme** ◇ **1 kleizlunad g. 2 kleizvarwezad g.** 1 Gwazhiedlunad tennet d'an ampoent m'emañ demeraet kavennoù kleiz ar galon (sl. *angiocardiographie*). 2 (sl. *lévocardiogramme*).
- lévogyre** ◇ **laevogyral, laevogyric** ◇ **1 ~kleiztreiñ 2 kleizc'hwelus** aa. 1 A-zivout gwiennoù an nervennoù loc'hañ o treiñ an daoulagad a-gevre war gleiz. 2 Perzh gant sukrennoù 'zo evel ar fruktoz da c'hwelañ a-gleiz talenn al luc'h bleinekaet (sl. *dextrogyre, lévoverision*).
- lévoersion** ◇ **laeoverision** ◇ **kleiztreiñ** Fiñval kevreet a 'n daoulagad war gleiz (sl. *dextroversion, lévogyre*).
- lèvre de Tapir** ◇ **tapir Mouth** ◇ **beg Tapir** 1 Baliregezh ar weuz uhelañ, a stader en enebrezh miopatek. 2 Dre astenn erdal, usteñv briell araok gouzoug ar grozh.
- lévulosémie, fructosémie** ◇ **laevulosaemia, fructosaemia** ◇ **gwadlevulozegezh b., gwadfruktozegezh b.** Bezañ levuloz (fruktoz) er gwad.
- lévulosurie, fructosurie** ◇ **laevulosuria, fructosuria** ◇ **troazhlevulozegezh b., troazhfruktozegezh b.** Bezañ levuloz (fruktoz) er gwad.
- levure** ◇ **yeast** ◇ **govev** g. **ion** Bevedeg unkelligel, eus kevrennad ar Blastomiket, o ouennañ dre vroñsañ (sl. *Blastomycètes, Candida*).
- Lewis** : **épreuve de** ~ ◇ **Lewis test** ◇ **proud Lewis** Imbourc'h amkanet da ziforc'hiñ ar bouzarderioù dec'havael diouzh ar bouzarderioù treuzkas dre geñveriañ ar *stenren migornel* (bouc'h pe talbenn adreñv pleg ar skouarn) hag ar *stenren askornel* (brennigenn) ouzh froum un tonreizher; gwel eo ar *s. m.* eget ar *s. a.* pa vez bouzarder dec'havael pe pa vez reol ar skouarn, ar gin eo pa vez bouzarder treuzkas.
- Lewis** : **facteur, substance ou système** ~ ◇ **Lewis factor** ◇ **parenn b., danvezenn b. pe reizhiad b. Lewis** Mukopolisakarid hezeileizh (danvezenn Lewis pe *Le*, daou seurtad anezhi : *Lea* ha *Leb*), danzeet en halv gant 90% a 'n hiniennoù; treuzfurmet e vez dre ar c'henenn *Se* en danvezenn *H* a dalvez da enaozañ an antigenoù eritrokitel *A* ha *B*, spesadel d'ar rizoù gwad *A*, *B* hag *AB*; pa na c'hoarvez ket an dreuzfurmidigezh e danvez *H* (e diouer ar c'henenn *Se*), ez a an danvezenn *Le* da lenañ ouzh an hemati.
- Lewis** : **syndrome ou maladie de** ~ ◇ **Lewis syndrome or disease** ◇ **azoniad pe kleñved Lewis** Glukozwadisvec'h grevus hêrezhel e dianlen ezvezañ ar glikogen-sintetaz en avu.

Lewis : triade ou réaction de ~ ◇ **histamine test** ◇ **triadezh b. pe erwez** g. **Lewis** Erwez kroc'hen lec'hel o tarvezout prim goude ur sankadenn histamin en derm : lerc'h ouzh lerc'h ez anad un tachad glas-gwenn, ur rodennad eritem tro-dro, erfin ur grugenn linadell gelc'hiek.

Lewy ; **corps de ~** ◇ **Lewy's bodies** ◇ **korfoù Lewy** Ebarzhennoù loet e kitoplasm neuron ar steuñvenn du, naouus da gleñved Parkinson.

Leyden : **signe de ~** ◇ ◇ **arouez b. Leyden** Arouez a 'r pugnez endan-vegin war zedro enbruskel : e diaz ar brusk e stader un tachad tromm ouzh ar c'hiziata, didrouz ouzh ar selaouennañ, rannet rik diouzh an tachad reol ma klever sourr an anal.

Leyden-Moebius : **myopathie de ou type ~** ◇ **Leyden-Moebius dystrophy** ◇ **miopatiezh (rizh) Leyden-Moebius** Seurtad miopatiezh kentael argreskus ma tizh an isteñv kaherel gouriz an ezel traoñ kent emastenn d'an ilizi krec'h; e kemm ouzh *seizi gaouusteñvel Duchenne* e tedro gorrek hep gaouusteñv.

leydigien ◇ **pertaining to Leydig's cells** ◇ **leidigel aa.** A-zave da gelligoù Leydig, kelligoù entremezel ar glidenn o vorc'hañ an hormonou gourevel.

Lhermitte-Mc-Alpine : **syndrome de J. ~** ◇ **Lhermitte-Mc-Alpine syndrome** ◇ **azoniad Lhermitte-McAlpine** Daralladur ar reizhiadoù pikernennek hag ampikernennek, naouus dre ur reuter kaherel a rizh parkinsonek kevret gant loc'hadoù korrevanek ar fas, ar c'harloc'henn hag ar c'hargadenn ha gant strafuilhoù bred, o tarvezout goude an oad a 40 vloaz hag o tedreñ etreze ar marv dindan un nebeut mizioù.

Lhermite : **signe de J. ~** ◇ **Lhermitte's sign** ◇ **arouez b. Lhermitte** Anglevad un diskarg tredan o tiskenn a-hed al livenn gein hag an izili traoñ pa stouer ar penn, arouez stadet e-kerz ar skleroz strewek ha sklerozioù strollet ar mel.

liaison génétique ◇ **linkage** ◇ **hilere g.** Teskad div pe lies genenn loet war ur c'hromozom, oc'h amparañ ur *strobad* (Gl. *groupe de liaison*) : treuzkaset hêrezhel a-gevret e vez an doarenoù e dalc'h ar genoùnoù ereet, da skouer genenn an ovalokitoz ha hini ar barenn Rh; sezañ a c'hell ar strobad war ur c'hromozom somatek kenkoulz ha war ar c'hromozomou revel (anv a reer neuze a *revere* (Sz. *sex-linkage*) hag a *dreuzkas reveret*) (Gl. *transmission liée au sexe*).

(-)**libérine, substance libératrice** ◇ **releasing factor** ◇ **elloerenn b.** Pennanv ha lostger gallek o talvout kement ha Gl. *substance libératrice* (parenn pe *hormon elloiñ pe delankañ pe borc'hañ*) a-gevenep da Gl. *facteur inhibant* pe *inhibiteur* (*heuderenn pe skoilherenn, parenn pe hormon heudiñ pe skoilhañ pe heuder pe skoilher*), sk. : *gonadolibérine*, Br. *elloerenn ar gonadotropin* (sl. *facteur déclenchant (...), facteur inhibant (...), facteur inhibiteur (...), inhibiteur (...)*).

libér-, libr-

- *acides aminés libres* amindrenkennoù digraf
- *bilirubine libre, non conjuguée* bilirubin ankeveil
- *bord libre de l'ongle* ribl rez a 'n ivin
- *clairance de l'eau libre* dizeul a 'n dour rez
- *corps calcique libre dans la lumière bronchique* korf razek dizalc'h en oaled ur vronkezenn
- *contenu dans le bord libre du petit épiploon* endalc'h et e-barzh ribl rez an danter bihan
- *fragment cartilagineux libre dans la cavité articulaire* tamm migorn diere ebarzh kavenn an arz
- *libération de substances vasoactives* dilaosk danvezennoù gwazhiedwezhus
- *libération d'une articulation ankylosée* adloc'husaat ur c'henvell tromaotek
- *libération de l'adréna-line* dilaosk a 'n adrenalin
- *libération du canthus de ses amarres* distagañ freilh ar valvenn diouzh e ereoù
- *libérer des ions OH⁻* dilaoskiñ ion OH⁻
- *libérer la peau des plans sous-jacents* ezglenañ ar c'hroc'hen diouzh an talennoù danlec'hiet
- *pores libres ou obstrués par un mince diaphragme* savnigou digor pe stanket gant ur stiv moan
- *protozoaires à l'état libre ou à l'état parasitaire* protozoed er stad rezvevat pe er stad arvevat
- *taux d'ammoniaque libre* feur amoniak digraf
- *fragments libres d'immunoglobulines* tammoù rez immunoglobulinou.

libido ◇ **libido** ◇ **libido b.** Termen latin o talvout kement ha "c'hoant, gourvenn, blizoni", despizet gant Freud evel "gremm al luzad revel".

Libman-Sacks : **syndrome de ~** ◇ **Libman-Sacks syndrome** ◇ **azoniad Libman-Sacks** Enkalonennfo kevret gant ul lupuz eritematus strewek, naouus dre vezañs amstruzhegennoù anvakteriel, hep erzerc'had klinikel.

lichen ◇ **lichen** ◇ **liken g.** Anvad rumm dermatozioù naouus dre grugennoù gronnet pe arskarek, debronek mui pe vui, dianav o arbenn; furmoù niverus a zeskriver diwar o neuz : *lichen nitidus*, dezhañ un arvez gwiadurel torzhellvanek, *l. obtusus*, graet gant krugennou bras hanterbellennek, *l. sclerosus et atrophicus* (Br. *liken sklerozek hag isteñvek*), nes d'ar skleroderma ha d'ar *krauzous vulvae*, *l. verrucosus* (Br. *liken amstruzhek*), *lichen neuroticus*, furm c'hrevus, alies marvus dindan un nebeut mizioù, h.a. (sl. *lichen plan*).

lichen plan ◇ **lichen planus** ◇ **liken plaen** Furm liken kentañ deskrivet (gant Hebra e 1862 a reas anezhañ *lichen ruber*; an anvad *l. planus* a voe roet dezhañ gant E. Wilson e 1867), dermatoz henek naouus dre grugennoù liestuek digevret pe strollet e reizh plakennoù, gourc'hennek munut, tezellet gant ur rouedad rizennoù opalek (rizennoù Wickham), sezet e lec'hiennoù diseurt eus ar c'horf (arznorn, organoù genel, dargreiz, glaourgen a 'r genoù); kemm a lakaer etre lies seurtad : *l. p. isteñvek* pe *sklerozek*, *lichen albus*, *lichen planus obtusus*, h.a.

lichen verruqueux, lichen corné hypertrophique ◇ **lichen ruber verrucosus** ◇ **liken amstruzhek, liken kornin usteñvek** Seurtad *liken plaen* o c'hoarvezout a dosennoù amstruzhek arruz, goloet gant un danvez kornin glenet start, a vent gant ur bizenn, o sezañ war an divesker dreist holl (sl. *névrodermite, prurigo simplex chronique*).

lichénification, lichénisation ◇ **lichenification, lichenization** ◇ **likenekaat** Argerzh kleñvedel e dianlen ar skrabañ, naouus dre blakadoù tezellet gant tevadur ar c'hroc'hen ha muiadur ar plegoù naturel, kentael pa zarvez an debron war groc'hen bonan da welout, pe eilvedel d'un anaf.

lichénoïde ◇ **lichenoid** ◇ **likenvanek** aa. A-zivout un anaf kroc'hen a neuz gant al liken.

Liddle : **syndrome de** ~ ◇ **Liddle syndrome** ◇ **azoniad Liddle** Lounezhad familhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, dibaot kenan, dianav e arbenn, naouus dre reñver an dassugañ natriom dre ar bibell bellek hag, *ent klinikel*, dre an uswask talmerel, an alkaloz kaliomwadisevec'hel hag an isaldosteronegezh; hervez aozerion 'zo e ve pareadus dre an amilorid hag an triamteren, troazhusvorc'herioù pellek.

lidocaïne ◇ **lidocaine** ◇ **lidokain** g. Danvezenn dezhi perzhioù *dieraaziñ lec'hiek* hag *enepmigorvez* diounezet dre ar wazhienn evel prederiatur diwar zifrae ouzh an usvroutadusted kofigel pergen.

Lieberkühn : **glandes de** ~ ◇ **glands of Lieberkühn** ◇ **gwagrennoù Lieberkühn** Gwagrennoù pibellek eeun loet e-barzh tonenn ar pervez, anezho pevar rizh a gelligoù borc'hañ (enterokit, kelligoù Paneth, kelligoù argantlen, kelligoù kibek) ha kelligoù andiforc'hek niverus, fonnus ganto ar mitozioù, araez azneveziñ epitelienn ar pervez.

lifting facial, rhytidectomie ◇ **face lifting** ◇ **azuc'haat dremm, dremmazuc'haat, azuc'håd** g. **dremm, dremmazuc'håd** g. Gwezh surjianerezh gwezelad dremm-gouzoug amkanet da barraat ouzh laosket ar c'hroc'hen : hemañ a ezglener diouzh an talennoù danlec'hiet hag a adstener dre zazbidañ ar reñver anezhañ.

ligament ◇ **ligament** ◇ **stagell** b. Lurell wiad kenglenel stirek ha dastennek, arwenn ha gwevn kenan, o keneren daou askorn ur c'henvell pe o terc'hel organoù skourret pe festet.

ligament large de l'utérus, TA *ligamentum latum uteri* ◇ **broad ligament of uterus** ◇ **stagell ledan ar grozh** Aspleg ampelenn astennet etre ribloù kostez ar grozh ha speurioù kostezel al lestr, ouzh e ober, e krec'h, *tachad ar plegoù* (Gl. *zone des plis*), anezhañ *rouedenn ar grozh* (TA *mesometrium*), r. ar *vierez* (TA *mesovarium*), r. ar *gorzenn* (TA *mesosalpinx*) ha, dindan, diaz (TA *basis*) ar stagell ledan, a zo e barzh uhelañ pe *lezkrozh* (TA *parametrium*) treuzet gant ar san droazh ha gwazhied ar grozh hag ar gouin, e barzh izelañ enlenet ouzh *krommenn ar gouin* (TA *fornix vaginae*) ha *gouzoug ar grozh* (TA *cervix uteri*).

ligamentopexie ◇ **ligamentopexy** ◇ **stagellAanlenañ** Anvad rumm ar gwezhioù berraat ar stagelloù ront war-benn parraat ouzh drekwariadur ar grozh.

ligand ◇ **ligand** ◇ **lenant** g. 1 Molekulenn, atomenn pe ionenn ereet ouzh un hennad kreiz (atomenn, ionenn) hag e se oc'h amparañ e amva eeun. 2 Molekulenn en araez da lenañ ouzh ur buzer kelligel, sk. : *hormonoù, katekolamin, nervhanteradoù, interleukinoù*, h.a.

ligase, synthétase ◇ **ligase** ◇ **ligaz** g. Enzim o treluskañ un dazgwered enaozañ e ser dourrannañ ur molekul adenosin trifosfat ha, dre se, o kevaraezañ aderen tammadoù molekul (DNA da skouer), gantañ ur gwered gin da wered an endonukleazoù (sl. *endonucléase, génétique* : *système de restriction-modification* ~).

1 ligaturer, ligature 2 ligature ◇ **1 to ligate, ligation, ligature 2 ligature** ◇ **1 argoulmañ, argoulmad** g. **2 argoulm** g. 1 Stardañ ul liamm en dro d'ur wazhiedenn, ur ganol, un tamm gwiad, un organ pe ur yoc'henn. 2 Neudenn arveret da argoulmañ pe da grafaelañ, o c'hoarvezout a lin, kotoñs, sidan, katgut, metal, danvezennoù kevanaozet.

liaison, lien, lier, ligature

- *affection liée à une carence* anaez devoudet gant un negez
- *artère sectionnée ou liée* talmerenn skejet pe argoulmet
- *desquamation lamelleuse liée à la persistance de la couche épitrichiale* gourc'hennadur lavnek diwar drebard ar gwiskad epitrikel
- *enserrer le col utérin dans une ligature circulaire* amwaskañ gouzoug ar grozh diwar-bouez un argoulm
- *fixer la mandibule au maxillaire en position d'occlusion par l'intermédiaire de ligatures, de gouttières ou d'arcs* sonnañ an div aven el lakadur kehaz diwar-bouez argoulmoù, savnelloù pe waregoù
- *forme liée à un trouble métabolique* furm e diazalc'h un direizh eus ar c'hennevid
- *l'absence de sécrétion d'insuline, liée à la destruction par des autoanticorps des cellules β des îlots de Langerhans* an anvorc'h insulin e dianlen an distruj gant unanantikorfoù eus kelligoù β enezigoù Langerhans
- *lien de cause à effet* ere arbenn-gwered
- *liés à des protéines les carotènes forment les caroténoïdes* kengrafet gant proteinoù ez a ar c'harotenoù d'ober karotenoproteinoù
- *molécules de glucose reliées par des liaisons α 1-4* molekul glukoz etrezo ereoù α1-4
- *pigment lié à l'albumine* livegenn kediet ouzh an albumin
- *ramifications branchées par des liaisons α 1-6* bleñchennadur skoultrennoù krafet dre ereoù α1-6
- *somme des quantités d'acide chlorhydrique libre et lié aux mucoprotéines* sammad an drenkenn glordrek ken digraf, ken kengrafet ouzh ar mukoproteinoù
- *syndrome lié à une carence* azoniad a-geñver gant un negez
- *syndrome polyuro-polydipsique lié à une réduction de l'hormone antidiurétique* azoniad goursec'hed-eldroazh diwar divig an hormon eneptraosheiat
- *transmission récessive liée au sexe* treuzkas enkilek reveeret.

Lightwood : **syndrome de** ~ ◇ **Lightwood's syndrome** ◇ **azoniad Lightwood** Akidoz lounezhel klorwadusevec'hel padennek ha kuradus ar vagadell, oc'h erzerc'hañ ent klinikel dre ar sec'hed, an ustroazh, astal ar c'hreskiñ, an ankewant ha resmiadoù dourisevec'h terzhiennek (sl. *hyperchlorémie*).

ligne médiane : **syndrome de la** ~ ◇ **median line syndrome** ◇ **azoniad al linenn greizer** Teskad azonoù a-geñver gant ar yoc'hennoù empenn sezet e-barzh ar poull kloppenn adreñv (TA *fossa crani posterior*) e kefin al linenn greizer (TA *linea mediana*), o tizhout ar preñv, ar pevare kambr, oc'h erzerc'hañ dre un uswask enklompennel kentrat ha muiek, strafuilhoù ar c'hempouez (distabilled al loadur diazerc'h ha tuadur da gouezhañ war dreñv), reuted laurus ar c'hilpenn, istant gant barradoù tantel adreñv hag, alies, nistagmuz a-zremm.

(-)**lign-**

- *en ligne, de façon linéaire* a-linenn
- *espace, interligne* esaouenn
- *la ligne de partage entre l'euphorie hypomaniaque et*

l'euphorie normale al linenn disparti etre gourboz ar gouvania hag an hevred • *la ligne de rencontre de l'antigène et de l'anticorps* linenn getal an antigen hag an antikorf • *ligne isoélectrique* linennpe regenn geitredan, diazregenn • *lignée* pe *série érythrocytaire* pe *érythroblastique*, *érythron* ac'had eritrokitel pe eritroblastel pe ruz, ruzac'had • *lignée* pe *série leucocytaire* pe *leucoblastique*, ac'had leukokitel pe leukoblastel pe gwenn, gwennac'had • *lignée séminale* ac'had sperel • *précurseur de la lignée* diaraoger an ac'had • *perception de points et de lignes brillants* merzhadur pikoù ha linennoù luc'hus • (*s*)*aligner sur* steudañ diouzh • *trait* pe *ligne de précipitation* regenn dierc'hiñ.

ligneux ◇ **ligneous** ◇ **koadesk** aa. O kaout kantalc'h ar c'hoad.

lilac-ring ◇ **lilac-ring** ◇ **gwrimeñn** b. **vouk** Bevenn roz-limestra plakennoù ar skleroderma.

Lima : **opération de E. de** ~ ◇ **Lima's operation** ◇ **gwezh** g. **Lima** Prederiadur surjanel ar c'hevfoioù henek dre sungarzhañ holl gevioù an dremm (kevioù ar garvan, ar sileg, an tal, ar genneg) dre hent treuzkarvanel.

limbe de la cornée ◇ **limbus corneae** ◇ **gwrimeñn** b. **ar gornsae** Tachad ardreuziñ etre ar gornsae treuzwelus hag al lersae demer, toenn an ank kanevedenn-kornsae.

limbique : **système** ~ ◇ **limbic system** ◇ **reizhiad** b. **ar senklenn** Rannbarzh an empenn, ouzh he ober *troenn ar senklenn* (TA *gyrus cinguli*, Gl. *circonvolution limbique*, a-gent *première circonvolution limbique*, *circonvolution du corps calleux*), hag an droenn *lez-pennmarc'hig* (TA *gyrus parahippocampalis*, Gl. *circonvolution parahippocampique*, agent Gl. *circonvolution de l'hippocampe*) (sl. *circonvolution limbique*).

limitantes élastiques ◇ **elastic membranes** ◇ **lavnennoù** l. (b.) **bevennus dastennek** Gwiskadoù gwiennoù dastennek etre saeoù an talmerennoù : al *lavenn vevennus diavaez* (Gl. *lame limitante externe*) etre ar grennsae hag an ezsae, al *lavenn vevennus diabarzh* (Gl. *lame limitante interne*) etre ar grennsae hag an ensae .

(-)**limit-**

- *blépharorrhaphie limitée à la région du canthus* malvenndlita bevennet da freilh ar malvennoù • *cavité limitée par l'amnios* kavenn bonnet gant an amnion • *difficile à délimiter* diaes da zezvonnañ • *limitation de l'amplitude articulaire* isheled ur c'henvell • *limitation des mouvements d'une articulation* harzegañ fiñvoù ur c'henvell • *limitation nette* dezvonn spis • *limiter l'amplitude des mouvements articulaires* leiaat heled fiñvoù ur c'henvell • *lame limitante postérieure* lavnenn vevennus adreñv • *mineur*, *limité*, *léger* leiek • *ne dépassant pas la limite normale* en amgant reol • *où l'opacité est limitée aux couches corticales* ma vez kantet an demerad e gwiskadoù ar gaenn • *pente limite* naou bevennat • *placards mal limités* plakadoù dihevonn • *un nombre limité de cas* un niver argrenn a zegouezhioù • *un territoire bronchique limité* un triad bronkez bonnek.

Lindau : **maladie de** ~, **hémangioblastome multiple** ◇ **Lindau's disease** ◇ **kleñved Lindau**, **hemangioblastom liesel** Yoc'henn wazhiedel an nervedg kreiz (angioblastom) sezet peurliesañ e par an ilpenn, erzerc'hat peurliesañ dre arouezioù amwask empenn; kevret e vez gwechoù 'zo gant un angiom a 'l luc'hsae (*kleñved von Hippel*), yoc'hennoù pe kammneuziadoù organoù ar c'hof (kistoù an ilgreiz pe al lounezhi), furmoù kemplezh a skriteller *kleñved von Hippel-Lindau*, renket e stern ar fakomatozioù (sl. *phacomatose*).

linea fusca ◇ **linea fusca** ◇ **linea fusca** b. Bandenn livegat azgell 1 cm led dindan vevenn ar brigenn eus an eil ividig d'egile, bet deskrivet a-geñver gant anafoù foel pe hanweel an empenn.

liné-

- *activité linéique* oberiekter regel • *densité linéaire de force*, *force linéique* nerzhder regel • *granules disposés de façon linéaire*, *en lignes* greunanoù stalet a-linenn • *image radiographique en forme d'opacité linéaire* skeudenn skinlun e stumm un demerenn linennek • *polymère linéaire* polimer digorvell.

Linguatules ◇ **Linguatulae** ◇ **Linguatul** s., **Linguatulae** l. Urzhad Araknid dezho ur c'horf preñvvanek, anpav ha gwalennek, un analañ kroc'heneh hag ur genoù krogaoek, o trigañ, an oadoured e benvegad analañ an naeron bras, al larved e-barzh flugez loened diseurt; gougevret eo ar spesadoù oc'h arbevata an den ouzh ar genadoù *Linguatula serra* ha *Porocephalus*.

linguatulose ◇ **linguatuliasis** ◇ **linguatuliaz** g. Erialerezh gant al linguatul (sl. *porocéphalose*).

lingula ◇ **lingula** ◇ **lorikenn** b. Anvad peder elfenn gorfadurel : *lorikenn an ilpenn* (TA *lingula cerebelli*), parzh kofelañ tolbezenn araok an ilpenn; *lorikenn ar c'haved* (TA *lingula mandibulae*) lavnennig tric'hornek war dalbenn diabarzh barr ar c'haved, bevenn araok kanol ar c'haved, lec'h enlanañ ar stagell c'henneg-gaved; *lorikenn ar genneg* (TA *lingula sphenoidalis*), baleg tanav war dreñv etre korf hag askell vras ar genneg; *lorikenn ar skeventenn gleiz* (TA *lingula pulmonis sinistra*), teodenn diwar parzh izelañ tolbezenn grec'h ar skeventenn gleiz e keñf an ask a-galon.

lingulectomie ◇ **lingulectomy** ◇ **lorikennezvenañ** Dilemel surjanel lorikenn ar skeventenn gleiz.

liniment ◇ **liniment** ◇ **lindreli** g. Angevezh apotikel melein a arloer ouzh ar c'hroc'hen, tevoc'h eget ar balzam, tanavoc'h eget an ogan (sl. *baume*, *embrocation*, *onguent*).

linité plastique ◇ **linitis plastica** ◇ **linit** g. **plastek** Seurtad kankr ar stomok naouus dre gourfaoted ar stroma stirek o reiñ dezhañ neuz ur skirr.

linkage, groupe de liaison ◇ **linkage** ◇ **eread** g. Bodad div pe lies genenn loet keñf war ur c'hromozom ha treuzkaset agevret en hêrezh (sl. *liaison génétique*).

linose ◇ **linen worker's disease** ◇ **linoz** g., **analuzoregezh** b. **diwar lin** Skeventad diwar zewentañ antigenoù bevel a-geñver gant ardizh an uzor lin (sl. *byssinose*, *cannabiose*, *pneumoconiose*).

liomyome ◇ **leiomyoma** ◇ **leiomiom** g. Yoc'henn guñv evodet diouzh ar c'haher levn, o tizhout dreist holl ar grozh.

liparitose ◇ **liparitosis** ◇ **liparitoz** Analeuflegezh vicherel diwar zewentañ uloc'h maen poeñs (sl. *pneumoco-niose*).

lipase ◇ **lipase** ◇ **lipaz** g. Enzim o tourannañ an druzennoù etre trenkennoù druz hag alkoool, bezant e sug an ilgreiz, e sug ar pervez, er gwad hag e douhennadoù ar flugez (sl. *lipolyse*).

lipasémie ◇ **lipasaemia** ◇ **lipazwadvec'h** g. Feur al lipaz er gwad, dindan 190 UE/l; reñverek e vez e tizhadoù an ilgreiz hag en ilgreizfo lemm dreist holl.

NOTENN : El Liaoniezh, evit danvezennoù 'zo, e tewezer ar c'hementadoù dre unanennoù savelet dre andalañ ar gwerederezh bevedel anezho ha n'eo ket dre zewerzhañ o naousterioù alvezel; e se, ez eus bet kendivizet, dre emglev etrevroadel, ur reizhiad unanennoù; hogen tra ma 'z eo unvan reizhiad an unanennoù hag ar berradurioù ouzh o arouezñ, n'eo ket bet unvanet, ac'hoel betek henn, berradur an termen "unanenn etrevroadel"; ober a reer gant IU pe U (*International Unit*) e saozneg, IE pe I (*Internationale Einheit*) en alamaneg, UI (*Unidad Internacional, Unité Internationale, Unità Internazionale*) e spagneg, galleg, italianeg, h.a.; betek gouzout, ez arveran UE (*Unannenn Etrevroadel*).

lipectomie ◇ **lipectomy** ◇ **behinezvenañ** Dilemel surjanel ar gwiad behinel, da skouer diwar speur kof ur gouziviad borb (sl. *cutanéolipectomie*).

lipémie ◇ **lipaemia** ◇ **1 gwadvec'h** g. **lipid**, **lipidwadvec'h** **2 gwadvec'h** **triglicerid**, **trigliceridwadvec'h** 1 Aozerion 'zo a ra kensterioù eus *lipémie* ha *lipidémie*. 2 Feur trigliceridoù er gwad, ent reol dindan 1,50 g/l (sl. *dyslipémie, hyperlipémie, hypolipémie, lipidémie*).

lipides ◇ **lipids** ◇ **lipid** s. & g. Anvad rumm esterioù trenkennoù druz dezho un tolz mol uhel, bezant er gwiadoù bevel; trenkennoù dre C₁₆ ha C₁₈ eo an trenkennoù druz (palmitek, stearek, oleek ha linoleek), alkoooloù nitrojenek pe glikeroù eo an alkoooloù; kemm a lakaer etre a) al *l. eun*, diforc'het o unan hervez an alkoool etre *steridoù* (steroloù) ha *seridoù* (alkooloù alifatek); b) al *l. fosforin, glikerofosfolipidoù* (lekiteinoù ha kefalinoù) ha *singofosfolipidoù*; c) al *l. nitrojenek* (kerebrozidoù ha gangliozidoù); d) al *l. sulfurin* (sulfatidoù); evel d'an trenkennoù druz ez eus d'al lipid ur blein dourlen (-COOH) hag ur blein dourlez (-CH₂-CH₃), bleinegezh a adkaver en div haen lipidek eus koc'henn ar gellig; a du 'rall ez a al lipid da amparañ er bevedeg ur mirad gremm, ur gwreanreer hag ur gwarez ouzh ar stokoù.

lipidémie ◇ **lipidaemia** ◇ **gwadvec'h** g. **lipid**, **lipidwadvec'h** Feur al lipid hollat er gwad, ent reol etre 5 hag 8 g/l; anezho ar c'holesterol hag an esterioù anezhañ, an trigliceridoù, ar fosfolipidoù hag an trenkennoù druz digraf; e-maez ar re-mañ ez eo an holl eret ouzh proteinoù e rezh kemplezhioù, al lipoproteinoù (sl. *lipémie, lipoprotéines*).

lipidogramme, **lipoprotéinogramme** ◇ **lipidogram** ◇ **lipidrestrad** g. **lipoproteinrestrad** g. Kevregad pe delun o terc'hennañ kenfeur pep hini eus al lipoproteinoù bezant en ul liñvenn vevel, dispartiet dre dredannizhañ war baper ha dinoet dre araез livuzennoù arbennik.

lipidoprotidogramme ◇ ◇ **lipidprotidrestrad** g. Kewelwerañ kevregadoù al lipidrestrad hag ar protidrestrad.

lipidurie, **lipurie** ◇ **lipiduria** ◇ **troazhlipidegezh** b. Bezañs, kleñvedel, lipid en troazh, a stader en azoniad nefrotek (er rolledoù epitele e vez esterioù a 'r c'holesterol e rezh korfoù daouc'houkugus) hag e kleñvedoù hêrezhel kennevid al lipid (sl. *biréfringence, chylurie, cylindres urinaires*).

lipiodiagnostic ou **lipiododiagnostic**, **examen radiolipiodolé** ◇ **lipiodology** ◇ **lipiodolluniñ**, **lipiodollunad** g., **imbourc'hiñ** pe **imbourc'h** g. **skinlipiodolel** Imbourc'hiñ dre araез al Lipiodol[®] (liñvenn eoulek iodin demer ouzh ar skinoù X) ensinklet en ur gavenn pe ur ganol eus ar bevedeg en amkan ur skinselliñ pe ur skinluniñ.

Lipman : **système de** ~ ◇ **Lipman's system** ◇ **reizhiad** b. **Lipman** Teskad enzimoù analadel ha gremmel bezant e koc'henn kitoplasm ar bakteri.

lipalbuminique : **index** ~ ◇ ◇ **feuriader** g. **lipid-albumin** Muzul ar c'hementad lipid eret ouzh seromalbumin ar plasma, ent reol dindan 12 %; en nefroz lipoidel e sav dreist 60 %.

lipoarthritis sèche ou **lipoarthrose des genoux** ◇ **lipoarthritis** ◇ **lipoartroz an daoulin** Seurtad artroz an daoulin (gonartroz) o tarvezout gant ar merc'hed e grez ar paouez mizioù, erzerc'hat dre al laur, an andrafted, laoskegezh ar stagelloù, strakadoù er c'henvell, usteñv ar behin tro-genvell.

lipoatrophie ◇ **lipoatrophy** ◇ **behinisteñv** g. Leidiñ gwiad behinel ar bevedeg.

lipocaïque : **hormone** ~ ◇ **lipocaic hormone** ◇ **hormon** g. **lipokaek** Hormon borb'het gant kelligoù α enezigoù Langerhans an ilgreiz, a ve e wered treuzfurmiñ an trenkennoù druz e glukid; an diouer anezhañ a ve en orin al lipidwadvec'h ha dic'henezhañ behinek an avu.

lipocèle ◇ **lipocèle** ◇ **behinogad** g. Avelenn amparet gant behin.

lipocytique ou **lipémique** : **coefficient** ou **indice** ~ ◇ **lipemic index** ◇ **argement** g. **gwiadlipidel** pe **gwadlipidel** Keñver ar c'holesterol ouzh an trenkennoù druz hollat er gwiadoù pe er gwad; er gwad (Gl. *indice lipémique Terroine*) emañ ent reol etre 0,43 ha 0,45.

lipodystrophie ◇ **lipodystrophy** ◇ **behinvideñv** g. Mideñv lec'hiet er gwiad endan-groc'h en o tec'h an isteñv pe ar c'hoefv anezhañ dre zarallad an adipokit; lies azoniad a zeskriver : b. *familhel darnel* (azoniad *Kobberling-Dunnigan*), b. *hollek* (azoniad *Lawrence*), b. pe *lipidloez insulinel*, kemmesk usteñv hag isteñv ar gwiad behinel endan-groc'h en a stader gant an diabeiteon

e tachadoù sankañ an insulin, *b. pervezel (kleñved Whipple)*, *b. argammedek (kleñved Barraquer-Simons)*, azoniad naouus dre steuziadur argreskus hag hollel behin endan-groc'hen rannbarzhioù uhelañ ar c'horf ha behinegezh ar rannbarzhioù a-is ar begel.

lipofibrome ◇ **lipofibroma** ◇ **lipofibrom** g. Yoc'henn gemmesk o c'hoarvezout a wiad behinel hag a wiad stirek.

lipogenèse, lipidogenèse ◇ **lipogenesis** ◇ **lipidparañ, behinbarañ** Teskad an anadennoù kennevidel o tisoc'h gant amparadur al lipid.

NOTENN : Hervez an aozerion ez eo kenster pe *lipogenèse* ha *lipidogenèse* (Br. *lipidparañ*), keal bevgimiek, pe *lipogenèse* hag *adipogenèse, adipogénie* (Br. *behinbarañ*), keal bevedoniel (sl. **adipogenèse**).

lipogranulomatose ◇ **lipogranulomatosis** ◇ **lipogranulomatoz** g. Tanijenn anlestel ar gwiad kelligbehinel, naous, *ent neuz-iadurel* dre neriñ, marvennañ ha fibrosaot an adipokit, kevret gant un erwez hoiñ er gwiad kenglenel kefin, *ent klinikel* dre furmiñ yoc'hennou behin hevonn pe hevonnoc'h (lipogranulomou).

lipoidase ◇ **lipidase, lipoidase** ◇ **lipidaz g., lipoidaz** g. Enzim en araez da zourranñ al lipid, a ve bezant el leukokit eus an ac'had mieloidel.

lipoïde ◇ **lipoid, lipoidal, lipidic** ◇ **1 lipoïdek aa., lipidek aa. 2 lipidvanek aa. 3 lipoïdel aa. 4 lipoid g. 5 lipidvan g.** 1 A natur gant al lipid pe ar behin. 2 Warnañ neuz al lipid pe ar behin. 3 sl. **lipoïdique** 3. 4 Korf lipoïdek, lipid, behin, sk. : al *lekittin* (gwir lipid) 5 korf lipidek da welout, sk. : ar *parafin* (eoul meinel).

lipoïdique ◇ **lipoid, lipoidal, lipoidic, lipoidous, fatlike, adipoid** ◇ **1 lipoïdek aa. 2 lipidvanek aa. 3 lipoïdel aa.** 1 A natur gant al lipid pe ar behin, sk. : *koc'hionadoù lipoïdek, anezho fosfolipidoù ha kolesterol* (sl. *dermatite atrophiante lipoïdique*). 2 A neuz gant ul lipid (sl. **lipoïde** 2). 3 Arver istorel, sk. : *nefroz lipoïdel* (Gl. *néphrose lipoïdique* pe *lipoïde*, Sz. *lipoid nephrosis*), skritell lakaet e 1917 gant Epstein ha chomet betek gouzout war ur c'hleñved dianav c'hoazh e natur hag e arbenn (sl. *néphrose lipoïdique*).

NOTENN : Amjestr eo diboubañ hordenn arverioù Gl. *lipoïde*, Sz. *lipoid* hag o deveradoù, hanc'herioù aet amsteriek dre benn diegi an aozerion da emzizober eus termenou dispredet da heul araokaat ar skiantoù. War a hañval evelkent, ez eo tonket ul lod anezho da vont e-maez arver (erlec'hiañ a ra endeo ar saozneg-erion ar bennrann *lipid-* ouzh ar bennrann *lipoïd-* e lies degouezh).

lipoïdose, lipidose ◇ **lipidosis** ◇ **lipidoz g., lipoïdoz** g. Ensiladur lipidou (fosfatidoù, kerebrozidoù, kolesterol) en un organ pe ur gwiad, a stader da geñver kleñvedoù 'zo eus ar c'hennevid a anved ksantomatozioù; hervez dasparzh ar c'hoc'hionadoù lipid e tiforc'her ar furmoù *lec'hiek* (gerontokson, ksantomou kroc'hen) ha furmoù *benvegadek* : *l. kroc'henel, avufelc'hel, askornel, nervel, skeventel (skevent terennek, Gl. poumons en rayons de miel)*, kalongwazhiedel (skorted kurunerel, azoniad Müller), loun-ezhel (nefroz lipoïdel?).

lipolyse, adipolyse ◇ **lipolysis** ◇ **lipidloezañ, lipidloez g., behinloezañ, behinloez** g. Dourranñ al lipid bouedel etre trenkennoù druz digraf hag alkool (glikerol, diwar an triglikeridoù) o tarvezout e-kerz ar c'hoazh-hañ pervezel, dindan wered ar vestl hag ar sug ilgreiz (sl. **adipolyse**).

lipolytique ◇ **lipolytic** ◇ **lipidloezus aa., behinloezus aa.** O tevoudañ al lipidloezañ.

lipomateux ◇ **lipomatous** ◇ **lipomatus** aa. 1 Gant lipomou pe al lipomatoz. 2 A-zave d'al lipomou pe d'al lipomatoz.

lipomatose ◇ **lipomatosis** ◇ **lipomatoz** g. Azoniad naouus dre vezañs un niver bras pe vrasoc'h a lipomou; lies furm a zeskriver hervez dasparzh an anafou : *l. nozelek liesel an dargreiz hag an izili*, anaez hêrezhel, anezhañ ozvennoù endan-groc'hen a vent bihanoc'h eget ur graoñenn, kevret gant strafuilhoù lodenn (laurioù, mieraizioù); *l. hanrannel ar c'héf*, ma vez lec'hiet an tolzennoù behin e par gourzioù an izili krec'h ha traoñ ha lodenn izelañ ar bruski; *l. kemparzhek kantet*, diseurt e lec'hiauriou gant muiegezh e par ar gouzoug.

lipome ◇ **lipoma** ◇ **lipom** g. Yoc'henn guñ amparet gant neridigezh gwiad behin reol e rezh ozvennoù lec'hiet dindan ar c'hroc'hen.

liponeogénèse, néolipogenèse ◇ **liponeogenesis** ◇ **lipidnevezparañ** Furmiñ er bevedeg (en avu hag en druzkelligoù) lipid-ennoù diwar ar glukid; roll bras zo gant an insulin en arc'hwel-se.

lipoprotéine ◇ **lipoprotein** ◇ **lipoprotein** g. Aoz al lipid er gwad, ereet ouzh ar proteinoù (ouzh ar globulinoù plasmatek peurliesañ), e rezh molekul daouat enta, lies seurtad anezho, a rummer dre an tronizhañ hervez o douester : 1) ar *c'hilomikron* pe *rak-β -I*, izel kenan o douester, (arouezet dre an teskanv *VLDL*, Sz. *very low density lipoprotein*), 2) al *l. a zouester izel* pe *β -I* (*LDL*, Sz. *low density lipoprotein*), 3) al *l. a zouester etreat* (*IDL*, Sz. *intermediate density lipoprotein*), 4) al *l. a zouester uhel* pe *α -I ponner* (*HDL*, Sz. *high density lipoprotein*); er rummoù *rak-β -I* ha *β -I* ez eo uhel kenfeur al lipid (triglikeridoù ezdeuat er c'hilomikron, triglikeridoù endeuat ha kolesterol er *β -I*) hag izel kenfeur ar proteinoù (*β*-globulinoù); en daou rumm diwezhañ, *IDL* hag *HDL*, en eneb, ez eo izel kenfeur al lipid (kolesterol ha fosfolipidoù) hag uhel kenfeur ar proteinoù (*α*-globulinoù); en aterokleroz hag en nefroz lipoïdel e vez uhel bec'h an *LDL*, naouuster en orin al lesanv "kolesterol fall" lakaet war hemañ.

lipoprotéine-lipase ◇ **lipoprotein-lipase** ◇ **lipoprotein-lipaz** g. Enzim lipidloezus en araez da zourranñ an triglikeridoù ha d'o ec'haozañ etre glikerol ha trenkennoù druz, bezant e gwiadoù niverus, evel ar behin hag ar c'haher kalon; borc'het e vez gant speurioù ar c'horrwazhied goude ensinkladur heparin : ar *barenn voullaat* eo, a ra da arvez laezhek ar plasma steuziañ dre zispenn ar c'hilomikron.

liposarcome ◇ **liposarcoma** ◇ **liposarkom** g. Hanwe evodet diouzh ar behin.

liposclérose ◇ **liposclerosis** ◇ **liposkleroz** g. Skleroz ar behin.

liposidéine ◇ ◇ **liposiderin** g. Livegenn houarnin anavezet fall he natur gimiek, anezhi lipofuksin pe hemofuksin eret ouzh kementadoù boc'hedel houarn; evel an hemosiderin e vez kavet e-barzh ar flugez ha naouus eo an usvec'h anezhañ d'an azoniadoù elhouarnel (d'an hemokromatoz pergen) (sl. *hémochromatose*).

liposoluble ◇ **liposoluble** ◇ **druzenndileizh** aa. A-zivout an danvezennoù hezileizh en druzennoù.

liposome ◇ **liposome** ◇ **lipozom** g. Bozhigell galvezadel munut kenan (muzuliet he zreuzkiz e nanometroù) o c'hoarvezout a zaou wiskad fosfolipid en dro d'ur c'hementad liñvenn, en araez da dreuziñ koc'henn ar c'helligoù; imbourc'hioù a rener en amkan arverañ al lipozomoù evel dezougerioù oksigen, enzimoù, liaoù, gen.

liposuccion, **lipospiration** ◇ **liposuction** ◇ **behinsuc'hañ** Gwezh surjianerezh atelviñ pe heneuziñ, anezhañ dilemel ar behin endangroc'hen dre araez korzаноù suc'hañ.

lipothymie ◇ **lipothymia** ◇ **vaganiñ**, **vaganad** g. Diaezad berrbad, naouus dre un anglevad enkreuz a fatadenn gevogos, gant gwelved, c'hwezennoù, boudinelloù ha gwel brumennet; dibaot a wech ez a betek an ezwal; un darvoud eo a orin gwazhiedloc'hadel pe fromel.

lipotrope ◇ **lipotropic** ◇ **behingerc'h** aa. A-zivout an danvezennoù kimiek o lenañ ent hanbarek ouzh ar behin.

β-lipotrope : **hormone** ~, **β-lipotropine** ◇ **β-lipotropin** ◇ **hormon** g. **β-behingerc'h**, **β-lipotropin** g. Hormon poli-peptidik borc'hed, dindan reolerezh ar gouzerc'hvel, gant ar rakgougorfenn, e-barzh ar c'helligoù parer ar c'hortikostimulin, nes e luniad kimiek da hini an endorfinoù; dasperzhiañ a rafe e kaoulederezh ar gwad ha fraouaat parerezh an drenkenn adenzin monofoskorek korvellek (AMPc).

liqueur ◇ **liquor** ◇ **likor** g. Angevezh apotikel liñvel, dileizhad dourel, alkoool gwechall arodet outañ.

liquide céphalorachidien, **LCR**, **liquide cérébrospinal**, **LCS** ◇ **cerebrospinal fluid** ◇ **liñvenn b. benn-kein**, **LPK** Liñvenn borc'hed gant ar rouedad tolgenn hag assuget gant ar reizhiad wazhiennel kreiz, oc'h amparañ ur c'hombodad hiniennek; leuniañ a ra kambrou an empenn hag ar gavenn endan-gevniked, dispartiet diouzh ar gwad nerver dre ar bilhonenn danav, diouzh an eskern klopenn-mellkein dre ar bilhonenn dev; liñvenn gengrennek 130 mL ec'honad, dileizhet enni klor (120–130mmol/L), glukoz (3,8–4,2 mmol/L), proteinoù (0,15–0,45 g/L).

liquid-, liquéf-

• *chlore gazeux ou liquide* klor aezhenn pe liñvenn • *collections gazeuses ou liquides* hogennadoù aezhel pe liñvel • *compartiment liquidien* kombod dourennel • *contenu liquéfifié d'un foyer infectieux* endalc'had liñvelaet un annon pore • *encéphalographie liquidienne* empennluniñ liñvennel • *épanchement liquidien* fennad liñvenn, fennad liñvel • *kyste liquidien* kist liñvennek • *liquéfaction de la partie centrale du cristallin* liñvelaat lodenn greiz ar ferenn • *liquide, humeur* dourenn • *liquide d'ascite* torliñvenn • *liquide intestinal* liñvenn bervez • *liquide organique* liñvenn vevl, liñvenn vevedel • *liquide pleural* liñvenn grezoù • *liquide pulmonaire* liñvenn enskevent • *liquide séreux* levruzenn • *liquide séro-hématique* levruzenn wadek • *liquide spermatique* sperliñvenn • *liquide synovial* iruzenn • *liquides interstitiels* liñvennoù entremezel • *liquidien / diffluent* liñvennel, liñvennek / liñvennek • *liqui-dien, humoral* dourennel • *masse liquidienne* tolgennad liñvennoù • *organes où les échanges liquidien sont importants* organoù ma vez eskemmoù paot a liñvennoù • *phase liquide* arvez liñvel • *selles liquides* kac'hadennoù berus.

liséré de deuil ◇ ◇ **glizenn b. gañv** Arvez skinlun ur wrimenn demer en dro d'an anafoù eskern, oc'h erzerc'haat an adrazeakaat hag ar pare e-kerz un askornarzo torzhellek.

Lisfranc : **amputation** ou **opération de** ~ ◇ **Lisfranc's amputation** ◇ **ambidad** g. **Lisfranc** Ec'harzañ souk-kreiztroad (sl. *désarticulation*).

listériose ◇ **listeriosis** ◇ **listerioz** g. Anaez diwar *Listeria monocytogenes*, bazhell vihan heloc'h, ansporek, anaerat anret, Gram+, paot er gleñvedouriezh loenel, dibaotoc'h er vezekniezh denel; tredizhus dre ar boued pe dre an hent mamm-krouell; erzerc'hañ a ra e rezh ur wadlinstegezh varvus gant an nevezc'hanidi ha dre boreadurioù lec'hiek : pilhonempennfo peurliesañ, krezskeventfo, gaouc'horank dre vonokit gant an oadourion amgadarn; soliet e vez an deznaoiñ war anataat an hadenn.

lit

• *le débit sanguin du lit capillaire vrai* kas ar gwad en naoz korwazhiedel end-eeun • *lit artériel pulmonaire* naoz talmerel a-skevent • *lit artériel systémique* naoz talmerel trogorfat • *test au lit du patient* prouad ouzh gwele ar gouziviad.

lithectomie ◇ **lithectomy** ◇ **maenezvenañ**, **eztennañ grouan**, **grouaneztennañ** Dilemel grouan, sk. : *eztennañ grouaneus ar san vestl*.

lithémie ◇ **lithaemia** ◇ **litiomwadvec'h** g. Feur litiom er gwad gant gouziviad an usnoa dindan vezegadur dre halioù an elfenn-se, a zleer mirout dindan 0,95 mmol/l.

lithiase ◇ **lithiasis** ◇ **grouanegezh** b. Diwan grouan e-barzh ur gavenn pe ur ganol degorzhañ, sk. g. *lounezh*, g. *c'hwezhegell*, g. *halvel*, g. *vestlel*.

lithiasique ◇ **lithiasic** ◇ **1 grouanek** aa. **2 grouaneg** g. -eion **3 grouanel** aa. 1 Gant ar c'hrouanegezh. 2 Gouziviad ar c'hrouanegezh. 3 A-zave d'ar c'hrouanegezh.

lithologie ◇ **lithology** ◇ **grouanouriezh** b. Rann ar gleñvedouriezh o plediñ gant paridigezh ar grouan er bevedeg.

lithium ◇ **lithium** ◇ **litiom** g. Elfenn gimiek niverenn atom 3, alkaliek, direer kreñv, an hini skañvañ eus ar metaloù, diounezet er furm *karbonat* pe *glukonat* evit prederiañ an usnoa ; danvezet da aozañ podoù porzhiñ an adalfoù.

lithogène ◇ **lithogenous** ◇ **grouaneiat** aa. O tec'han grouan.

lithogénie ◇ **lithogenesis** ◇ **grouaneiadegh** b. Dec'han grouan.

litholytique, lithotriptide ◇ **lithotriptic** ◇ **grouanloezus** A-zivout an danvezennoù a ardaoler dezho ar perzh da loezañ ar grouan.

lithopexie ◇ ◇ **koc'hionlenañ** Diwan fetisaennoù urat natriom (tofuzoù) e-barzh an tolzennoù behin.

lithotriteur, lithotriptideur ◇ **lithotriptor** ◇ **grouanvrevr** g. -ioù 1 Benveg surjianerezh arveret da frukañ ar grouan e di-barzh ar c'hwezhegell. 2 Ardivink amkanet da vruzunañ ar grouan troazhel ha bestlel dre araez gwagennoù edrur (tredanliñvrenel, gwasktredanel, tredanwarellec, usstenioù).

1 lithotritie ou **lithotripsie intracorporelle** **2 lithotritie** ou **lithotripsie extracorporelle** ◇ **1 intracorporeal textmder endoscopic lithotripsy** **2 extracorporeal or shock wave lithotripsy** ◇ **1 grouanvreviñ enkorfel** pe **endoskopel** **2 grouanvreviñ ezkorfel** pe **dre wagennoù edrur** 1 Dispenn ar grouan troazhel ent treloc'hel dre araez ur grouanvrevr pe un ardivink laser ebarzhet ent surjiañ. 2 Dispenn ar grouan troazhel ha bestlel dre wagennoù edrur diounezet a-ziavaez (sl. *lithotriteur*).

-lith-

• *angiolithe* angiomañvaen • *artériolithe* talmerennvaen • *broncholithe* bronkezvaen • *broncholitiase* grouanegezh vronkez, bronkezvaen • *cholélithe* bestlvaen • *dacryo-lithe* daervaeñ • *coprolithe* monvaen • *entérolithe* pervezvaen • *lithiase biliare* grouanegezh vestlel • *lithiase rénale calcique* grouanegezh razek al lounezh • *lithiase urinaire* grouanegezh troazhel.

Little : **maladie** ou **syndrome de** ~ ◇ **Little's disease** ◇ **kleñved Little** Anaez naouus dre un treuzseizi dasstrizhek oc'h anadiñ ken abred ha mizioù kentañ ar vuhez gant bugale anafet o empenn e-kerz ar gwilioud (bet ganet en ur stad angwent, pe dre un eskoriñ darvoudek) ; un *daouseizi mabanel* eo, renket e rummad an *empennaouedoù a 'r vabaned* (sl. *diplegie, encéphalo-pathie infantile*).

Littre : **hernie de** ~ ◇ **Littre's hernia** ◇ **avelenn** b. **Littre** Ogad bogod ar glunegen (TA *diverticulum ilei*) dre walenn don ar varlenn (TA *anulus inguinalis profundus*) pe dre walenn ar vorzhed (TA *anulus femoralis*).

litrite ◇ **litritis** ◇ **gwagrennfo Littre, litrit** g. Tanijenn, blennoragek peurliesañ, ur wagrenn Littre (gwagrenn loet e glaour-genn ar c'han troazh) ha dinod ur pugnez en ervez da zigeriñ war un dro er c'han troazh ha dre ar c'hroc'hen, alese da furmiñ ur fic'h kalc'hel.

livedo ◇ **livedo** ◇ **livedo** g. Arvez morlivet an amwiskadoù, naouus dre an dulaz astennet e stumm ur rouedad, e dianlen ur strafuilh genezhel eus an amred korwazhiedel pe un danijenn (trodalmerennfo ulmennek) (sl. *périartérite noueuse*).

livedoïde ◇ **livedoid** ◇ **livedoidel** aa. A-zivout al livedo, o tennañ d'al livedo.

lividité ◇ **lividity** ◇ **glazez g., morlivet** b. Livrezh persvouk a 'r c'hroc'hen dre benn ar yenion, ar bloñsoù hag anaezioù diseurt ; *glazez kelanel, brondvad goudemarvel* (Gl. *lividité cadavérique, suggillation, Sz. postmortem lividity, suggillation*) a reer eus al lijoenn c'hasruz oc'h anadiñ war parzhioù dianaou ar c'horf un nebeut eurvezhioù goude ar marv.

livide

• *livide* glazezek, morlivet • *teint livide* nead morlivet, glazez an nead.

lixiviation ◇ **lixiviation** ◇ **trouezhañ, trouezhad** g. Araezad douhenniñ ma tremen dre wered ar ponnerder an dileizher a-dreuz ur seuld hueek a zo ennañ an danvezenn wezhus.

Lloyd : **signe de** ~ ◇ **Lloyd's sign** ◇ **aruez** b. **Lloyd** Laur devoudet, e grouanegezh al lounezh, dre hejañ al lounezh gant un dorn sanket en ank kestad-dargeiz.

loase, loasis ◇ **loasis** ◇ **loaziz** g. Erialerezh gant *Filaria loa* (sl. *filaires, filariose*).

lobe ◇ **lobe** ◇ **tolbezenn** b. Parzh eus ur flugezenn (skeventenn, skoedenn, empenn, avu, raksavenn) hiniennaet dre un dezvonn spis (nant, skarr).

lobe moyen : **syndrome du** ~ ◇ **middle-lobe syndrome** ◇ **azoniad an dolbezenn grenn** Strafuilh er gwenterezh diwar ur bronkezusvoll lec'hiet e triad tolbezenn grenn ar skevent, e dianlen isvoll bronkezenn an dolbezenn grenn, amwasket peurliesañ gant ur c'hwarrenn arlenat d'ur c'hentporead torzhellek.

lobectomie ◇ **lobectomy** ◇ **tolbezennzevenañ** Dazbidañ un dolbezenn skevent, avu pe skoedenn ; *t. raogtael* (Gl. *l. préfrontale*) oberatadenn vredsurlianerezh, dilezet hiziv, amkanet da ziren bredanaezioù 'zo, anezhi dilemel pluskenn parzh araok an dolbezenn dal.

lobite ◇ **lobitis** ◇ **tolbezennfo** g. Tanijenn un dolbezenn skevent, sk. : *t. torzhellek*.

lobomycose, maladie de Jorge Lobo ◇ **lobomycosis** ◇ **lobomikoz** g. Mikoz kroc'hen eus ar gelc'henn etretrovanel amerikan, naouus dre ozvennoù a 'n derm, a-strew war an tachadoù en ardizh an daraezioù, ha dre un dedro gorrek war dekvloaziadoù ; devoudet eo gant ur seurtad govev, *Lobomyces*.

lobotomie ◇ **lobotomy** ◇ **tolbezennenbenañ** Skejañ gwiennoù un dolbezenn empenn, oberatadennoù bredsurjianerezh, dilezet hiziv; an *t. raogtalet (l. préfrontale)* hag ar *gwennenbenañ raogtalet* Gl. *leucotomie préfrontale*) oa anezho ar skejañ hollel pe darnel a 'r stirad gwenn etre ar bluskenn raogtalet hag ar peurrest eus an empenn, ha gronn kreizkein an derec'hvel pergen.

lobule ◇ **lobule**, **lobulus** ◇ **flipezenn b.** Unvez neuziadurel elfennel ur parenkim (skevent, avu, torzhienn, h.a.).

lobule auriculaire, **lobule de l'oreille** ◇ **lobule of auricle** ◇ **flipezenn skouarn** Lodenn draoù eus pleg ar skouarn (TA *auricula*), blot ha hep migorn.

lobule paracental, TA **lobulus paracentalis** ◇ **paracental lobule** ◇ **flipezenn lez-nen** Troenn loet war dalbenn diabarzh an hanterenn empenn en dro da benn krec'h an nant a-nen (Gl. *scissure de Rolando*).

(-)**lob-**

• *canal interlobulaire* kanol etre-flipezennoù • *canal intralobulaire* kanol enflipez-enn • *de structure lobulée* a luniadur flipezennek • *épithélioma lobulé* epiteliom flipezennek • *formes multilobées* furmoù lieshoskek • *formes paucilobées, peu segmentées* furmoù nemeurhoskek • *lobe antérieur du cerveau* flipezenn bevarc'hognek, tolbezenn grec'h an ilpenn, talbenn krec'h an hanterenn ilpenn • *l'aspect lobulé du noyau* hoskegezh ar graoñell • *lobe antérieur de l'hypophyse* rakgougorfenn • *lobule mammaire* flipezenn vronn • *noyau bi- ou trilobé* kraoñell daou- pe trihoskek • *pneumonie lobaire* skeventfo tolbezennel.

localisation cérébrale ◇ **cerebral localization** ◇ **keflec'hiad g. empenn** Tachad eus ar bluskenn empenn o klotañ gant an eraeziñ pe ul loc'hañ dibarek el lec'h-mañ lec'h eus ar c'horf; savelet eo bet glennad ar c'heflec'hiadoù empenn dre studiañ ar c'heñver etre anafoù an empenn ha daralladoù ar merzhout hag ar fiñval; ent armodel pe dre stadadennoù graet e-kerz an oberatadennoù war an empenn, e noter klotadurioù etre ar broudañ arloet ouzh tachadoù diseurt eus an empenn hag an eraezadoù diskleriet gant ar gouzviad pe an argrezadoù o c'hoarvezout gant kigennoù e gorf.

(-)**loc-**

• *aide fonctionnelle à la locomotion* harp arc'hwelel d'an emzilec'hiañ • *anesthésie locale* dieraeziñ lec'hiek • *appareil locomoteur* benvegad emzilec'hiañ • *bactéries qui se localisent au niveau de l'endocarde* bakteri a ya da lec'h'hiañ war an enkalonenn • *chute de cheveux, localisée ou diffuse* kouezh blev, lec'hiek pe strewek • *clivage localisé entre l'amnios et le chorion* disfaout lec'hiek etre amnion ha korion • *ischémie localisée* heskwad lec'hiek • *la circulation locale du sang* amred lec'hel ar gwad • *local où l'on vend des médicaments* stavell ma werzher liaoù • *local professionnel* stavell vicherel • *localisation initiale d'un cancer* kentsez ur c'hankr • *localisations viscérales* lec'hiadurioù flugezel • *locus lokuz* • *manifestations générales ou locales* erzerc'hadoù hollek pe lec'hiek • *tumeur se développant localement* yoc'henn o teñvañ war al lec'h • *strictement localisé au bulbe* kantet en hirvel • *utérus biloculaire* krozh divlog.

lochies ◇ **lochia** ◇ **olliñv g.** Naouez o verañ eus ar grozh da heul ar gwilioud, etre pemzektez ha miz pad, anezhi gwad, glaour ha dilerc'hiadoù torzhienn; hervez an neuz anezhañ e teskriver an *olliñv ruz* (Gl. *lochies rouges, Sz. lochia cruenta pe rubra*), an *olliñv levrus* (Gl. *lochies séreuses, Sz. lochia sanguinolenta*), an *olliñv linek* (Gl. *lochies blanches, Sz. lochia alba pe purulenta*).

lochiométrie, rétention des lochies ◇ **lochiometra, lochiostasis, lochioschisis** ◇ **azgannad g. olliñv, olliñv azgannat** Azdalc'h an olliñv er grozh, en askont peurliesañ d'ar rakplegad anezhi.

locus caeruleus TA ◇ **locus caeruleus** ◇ **lec'hiad g. azglas** Gronn steuñvenn louet loet en ank krec'h ar poull karavek.

locus niger de Soemmering, TA **substantia nigra** ◇ **black substance** ◇ **steuñvenn b. du** Lavenn steuñvenn louet loet e-barzh troad an empenn, etre an diaz hag ar golo anezhañ, anezhi neuron o tasperzhiañ an arouleviañ ar fiñvoù diarzoug.

locus niger : syndrome du ~ ◇ **locus niger syndrome** ◇ **azoniad ar steuñvenn du** Azoniad troadempenel e dianlen un anaf er steuñvenn du, naouus a-eiltu dre strafuilhoù an tant leteñvel ouzh re kleñved Parkinson.

(-)**locut-**

• *appareil de l'élocution* benvegad an distilhañ • *débit de l'élocution* read an distilh • *élocution* distilhañ, distilh • *interlocuteur* kenbrezegeger • *la liberté du locuteur par rapport à son langage* frankiz ar yezher e-keñver e lavar • *proférations locutoires* derhebdadoù.

Löffler : endocardite de ~ ◇ **Löffler's endocarditis** ◇ **enkalonennfo Löffler** Anaez dibaot, o tizhout ar baotred e-tro o fergont vloaz, naouus, *ent neuziad-urel*, dre ur gwiskad tev gwriad stirek perlezek o pallennañ enkalonenn speur un pe an daou gofig, oc'h enstrewiñ alese d'ar c'haker kalon, a-wechoù dre anafoù talmerennfo er flugez; *ent clinique*, dre ur skorted kalon, bloc'hel pe muiek azehou, gant torliñv, rouestladoù lounezhel, nerval hag amredel (tromboz hag enfroù), terzhienn hag eleozinofil, o trediñ d'ar marv a-benn un nebeut mizioù; dindan arguz emañ c'hoazh natur ar c'hleñved.

Löffler : syndrome de ~ ◇ **Löffler's syndrome** ◇ **azoniad Löffler** Resmiadoù darwazh dibad hag adfeilhus er skevent, lakaet war wel alies dre ar skinouriezh, kevret gant eleozinofil; sellet int evel erwezhoù allergek ar skevent ouzh keuziadoù diseurt: arvevadel (askariz), poreel, pistriel, darwalladel, enborc'hadel, h.a.

Löfgren : syndrome de ~ ◇ **Löfgren's syndrome** ◇ **azoniad Löfgren** Azoniad o tarvezout gant ar vaouez yaouank, o kevrediñ c'hwarrennoù tolzennek daoudu antorzhelek er poullkreiz hag un eritem ozvennek; hir eo an dedro, bepred avat etrezek ar pare; anaez arzodet gwech d'ur poread dre strepokok, gwech da gleñved Besnier-Boeck-Schaumann.

logagnosie ◇ **logagnosia** ◇ **gerandenaoud g.** Koll ar galloud da hennadiñ ur ger klevet pe lennet (sl. *agnosie*).

loge ◇ **chamber** ◇ **tirenn b.** Kombod etre tilhennoù m'emañ loet un pe lies organ, sk. *tirenn araok ar vrec'h m'emañ ar gigenn daoubennek*.

log-

• *cellules du cartilage situées dans des logettes ou chondroplast*es kelligoù eus ar migorn kludet e-barzh loganoù anvet kondroplastoù • *éléments intracellulaires contenus dans des loges circonscrites* elfennoù enkelligel bezant e-barzh loganoù kantet • *logettes entravant l'écoulement du pus* kevioùigoù o skoilhañ ouzh diver al lin • *lymphocytes logés dans des thèques* limfokit kludet e-barzh toagoù.

logoclonie ◇ **logoclonia** ◇ **kridadleñv** g. “arreta dasstrizhek ul leñvenn e kreiz pe e dibenn ur ger” (A. Porot).

logopédie (Belgia, Helvetia), **orthophonie** (Frañs, Kanada) ◇ **logopedics, logopedia, speech and language therapy, SLT** ◇ **lavareunañ, lavareunouriezh** b. Diskiblezh lezvezegel gouestlet da studiañ ha da brederiañ strafuilhoù al lavar (mouezhparañ, distilhañ, kehentiñ teodel ha skrivet).

logophobie ◇ **logophobia** ◇ **komzarur** g. Amgren neurozek rak ec'hodiñ pe enodiñ lavar.

logophonique : **amnésie** ~, **surdité verbale** ◇ **logophonic amnesia, verbal amnesia** ◇ **sterandenaoud** g., **sterankoun** g., **steranklev** Seurtad anenluz, anezhañ koll ar galloud da zec'havaelañ ster ar gerioù pe ar c'healioù eztaolet gant al lavar enodet (sl. *aphasie de Wernicke*).

logorrhée ◇ **logorrhoea** ◇ **froudareizhañ, froudareizh** g. Ezhomm anharzadus da gomz, dre zeluzañ prepozioù diamkan, dislenadec a-wechoù.

logosémiotique : **amnésie** ~, **cécité verbale** ◇ **logosemiotic amnesia** ◇ **kanteulandenaoud** g., **kanteulankoun** g., **geranlenn** g. Seurtad gwelankoun, anezhañ koll ar galloud da zec'havaelañ an arouezioù gwelet (sl. *cécité verbale*).

lombal, lombaire ◇ **lumbal** ◇ **l̃ dargreiz, dargreizel** aa. 2 **loan, loanel** aa. 1 (Korfadurezh) a-zave d'an dargreiz, rannbarzh a 'r c'hein loet etre ar c'hedad ha kribenn ar glun, sk. : *livenn dargreiz* (Gl. *rachis lombal* pe *lombaire*). 2 (Klinik) a-zave d'al loan, anvad all eus rannbarzh an dargreiz, sk. : *ensinkludur dre an hent a-loan* (Gl. *injection par voie lombaire*).

lombalgie ◇ **lumbago, low back pain** ◇ **loanost** b. Laur e rannbarzh an dargreiz.

lombalisation, lomarisation ◇ **lumbalization** ◇ **dargreizekaat** Digensoutad kentañ mellenn ar groazell, ganti neuz ur vellenn dargreiz, ezreolder oc'h ober, gant kroazellekaat (Gl. *sacralisation*) ar pempet mellenn dargreiz, stroll an *ezreolderioù ardreuzadel* (Gl. *anomalies transitionnelles*).

Lombard : **épreuve de** ~ ◇ **Lombard's test** ◇ **prouad Lombard** Prouad amkanet da zinoñ fincherezh ar vouzarded; an den reol e glevet a greñva e vouezh en ur metoù trouzus (*damoug melc'houedenn-kilreder*, Gl. *réflexe cochléo-récurrentiel*); ur fincher a sav read e vouezh pa barer trouz ouzh e zivskouarn diwar-bouez un talgen selaou.

lombarthrie, lombarthrose, arthrose lombaire, rhumatisme lombaire chronique ◇ **lumbal osteoarthritis** ◇ **artroz** g. **dargreizel, dargreizartroz, zimm** g. **dargreizel henek** Furm remm dic'henezhadel henek lec'hiet el livenn dargreiz hag o tevoudañ argrommadoù diwar zistummadurioù ar mellennoù (choukadoù, soutadoù, askorndeñvennoù) ha laurioù kriz a-loan pe a-goazez.

lombodiscarthrose ◇ **lumbodiscarthrosis** ◇ **diskartroz** g. **dargreizel, dargreizdiskartroz** g. Darallad diskoù etre-melloù an dargreiz, kevret gant anafoù ar c'horfoù mellenn (sl. *discarthrose*).

lombosciatalgie, lombosciatique ◇ **lumbago-sciatica** ◇ **koazezloanost** b. Nervost a-goazez kevredet gant un nervost e rannbarzh an dargreiz.

lombostat ◇ **orthopedic lumbar corset** ◇ **loangenn** g. -où Gouriz harpañ al livenn dargreiz.

lombotomie ◇ **surgical section of the loins** ◇ **loanenbenañ** Digeriñ surjaniel rannbarzh an dargreiz.

(-)lomb-

• *ponction lombaire* ezwanañ a-loan • *ponction translombaire de l'aorte* ezwanañ treuzloanel an aortenn • *produit de contraste injecté par voie sous-occipitale ou lombaire* aozad dargemm ensinklet dre an hent endan-gilpenn pe a-loan.

lombricose, ascaridose, ascaridiase, ascariase ◇ **lumbricosis, ascaridiasis, ascariasis** ◇ **askarioz** g. Teskad ar strafuilhoù devoudet gant bezañs *Ascarides lumbricoides* e-barzh ar ganol vezhur.

longiligne ◇ **longilineal** ◇ **hirizilik** aa. A-zivout ur rizh hiniennoù naouus dre hirded o izili ha berded o c'hef.

longitudinale : **réaction** ~ ◇ ◇ **erwez** g. **diahed** En imboure'h ur gigenn, broudadusted galvaniek brasoc'h pa zoder an daou elektrod war ar pennoù anezhi eget pa arloer an tredan ouzh ar poent loc'hadel; erwez kleñvedel oc'h erzerc'haat astal arc'hwele an nervenn loc'hañ, lodek en azoniad dic'henezhañ.

(-)long(-)

• *aberration chromatique longitudinale* gouskoevad livel diahed • *allongé, oblong* hirvoan • *allongement du temps diastolique* uspad an diastol • *allongement et dilatation anormaux* ushed hag usvoll • *bande longitudinale de substance blanche* bandenn diahed steuñvenn wenn • *branche de la mécanique utilisant les dimensions de la longueur, du temps et de la masse* skourr a 'l Loc'honiezh oc'h ober gant ar regad, ar pad hag an tolz • *chromosomes de même longueur* kromozomoù kehed • *comprimés à libération prolongée* moustradoù hirzilaosk • *croissance des os en longueur* kresk an eskern diouzh an hed • *d'égale longueur* kehed, keit • *diachroni-que, longitudinal* treadegel • *élongation musculaire des sportifs* darhedañ kigennel ar sportourion • *élongation vertébrale* dehirañ ar mell kein • *élonger, élongation* arhedañ, dehirañ • *hospitalisation de longue durée* klañvdiñ hirbad • *inhalation prolongée de fibres d'amiant*e dewentadur a-bad eus edañvoù asbest • *grossesse prolongée* bec'hiegezh askouezhet

• *longueur d'une ligne* ment ur regenn, regad • *longueurs d'onde de la lumière* trohedoù al luc'h • *prolongement cytoplasmique* astennad kitoplasm • *segment inférieur (de l'utérus) élongé* lodenn izelañ (ar grozh) arhedet • *spasme respiratoire prolongé* andag enanalañ hirbad • *station assise pro-longée* hirgoazez • *suppurations prolongées* linadurioù hirbad • *tirer longitudinale-ment sur un membre* sachañ aziahed war un ezel • *une sténose longue de l'artère* isvoll hedek eus an dalmerenn.

Looser-Milkman : **syndrome de** ~ ♦ **Milkman's syndrome**, **Looser's zones** ♦ **azoniad Looser-Milkman**, **rizennoù l. (b.) Looser** War ar skinlunioù, linennoù sklaer staled damgenparzhak a-serzh d'ar gaenn e-barzh treuzenn an eskern hir, ar barroù koazez-kaezour, ar c'hostoù, oc'h erzerc'haat gwiad osteoidel, a stader gant gouziviaded al lec'h hag an askornvlodad.

lophotriche ♦ **lophotrichen** ♦ **lofotrik** s. Seurtad bazheloù outo un doupennad blevanoù kreniat en unan eus o fennoù.

lordose ♦ **lordosis** ♦ **drekwar** g. Krommadur diasaezh hag argeinek war raok eus al livenn.

Lorenz : **formule de** ~ ♦ **Lorenz formula** ♦ **reollun g. Lorenz** Araezad jediñ ar pouez derc'hek hervez ar savder hag ar rev :

$$P \text{ kg} = (S \text{ cm} - 100) - [(S \text{ cm} - 150) / x]$$

dre reiñ da *x* ar werzhad 4 evit ar c'houved, 2,5 evit ar beneved; evel reel e seller ur werzhad eus P loet er gavael ± 10 %.

Lorenz : **positions de** ~ ♦ **Lorenz method** ♦ **lakadurioù l. (g.) Lorenz**, **hentenn Lorenz** Hentenn diren disvelladoù ganedigel al lez dre arloañ ouzh ezel traoñ ar bugel lakadurioù lerc'h ouzh lerc'h : da gentañ, pellaat, plegañ ha c'hwelañ war ziavaez e-pad tri pe pevar miz; d'an eil, pellaat, plegañ argrenn, hep c'hwelañ, tri miz pad; d'an trede, c'hwelañ war ziabazh e-doug tri miz; pal an embregadoù o vezañ angrizañ ar pourc'had ha diorren to ar bodenn.

1 lotion 2 lotion, lotionner ♦ **1 wash, lotio, lotion 2 to wash, wash** ♦ **1 golc'had g. 2 golc'hadiñ, golc'had** 1 Angevezh dre zour, un disterik alkoolaet a-wechoù, enno danvezennoù liaek en arlug pe war zileizh, da vezañ arloet ouzh ar c'hroc'hen pe ar glaourgennoù. 2 Arloañ ur golc'had.

Louis : **angle de** ~, **angle sternal**, **TA angulus sterni** ♦ **sternal angle** ♦ **ank g. ar glerenn** Kogn o valirañ war raok lec'hiet er junt etre dornell ha korf ar glerenn.

louping-ill, encéphalite écosaise ♦ **louping-ill** ♦ **louping-ill g., empennfo g. skosat** Kleñved o tizhout an deñved e Skos, kiriek dezhañ un arboviruz eus ar genad *Flavivirus*, treuzkaset gant an tarlask, naouus dre anadennoù nerval, krenerzh, peluzioù ha koma marvus alies; dre zavroud e vez poreet an den.

Lowe : **syndrome de** ~, **syndrome oculo-cérébro-rénal de** ~ ♦ **Lowe's syndrome**, **Lowe's oculocerebrorenal syndrome** ♦ **azoniad Lowe**, **azoniad lagad-empenn-lounezh Lowe** Anaev hêrezhel ha familhel dibaot, treuzkaset er mod enkilek, reveeret, o tarvezout raktal goude ar c'hanedigezh, naouus dre un empennaoued gant dilerc'hegezh vred muiek, kaheristant, ferennlug daoudu gant glaokom a-wechoù, osteoporoz, goulerc'h savder-pouez ha mineuz a 'n dremm, a-wechoù kellezlec'h ha tuellennaoued gant troazhproteinegezh, dizeul reñverek ar fosfor, akidoz kennevidel ha troazhusvec'h amindrenkennoù.

Löwenstein : **milieu de** ~ ♦ **Löwenstein-Jensen agar** or **culture medium** ♦ **metoù tiñvañ Löwenstein** Angevezh da gentaozad dezhañ vioù klok, ebarzh enno bleudenn avaloù douar, kitrat magnezium, sulfat magnezium, dihidrogenofosfat kaliom, asparagin (mammenn nitrogen), glikerol (mammenn garbon) ha gwer malakit (dilester), danvezet da diñvañ mikobakteri (bazhell Koch pergen).

Ludloff : **signe de** ~ ♦ **Ludloff's sign** ♦ **arouez Ludloff** Arouez torr an trovaleg bihan : dic'halloud ar gouziviad azezet da c'horren an ezel traoñ endra c'hell e ober pa vez gourvezet a-gein, dre ma vez neuze kigenn eeun ar vorzhed ha stenner ar faskienn ledan oc'h amsaviñ ar gigenn a-loan dizenlenet.

ludothérapie ♦ **play therapy** ♦ **c'hoarigurañ** Arverañ yac'hadel ar c'hoari.

Ludwig : **angine de** ~ ♦ **Ludwig's angina** ♦ **gorank g. Ludwig** Seurtad morfer dre strepokok pe stafilokok en tric'hogn endan-c'haved, naouus dre ur goevinn, ur galeted koadesk hag un emastenn herrek betek diaezañ an analañ (alese an anvad *gorank*), kevret gant ur stad hollek grevus; riskl a veze d'un dedro marvus kent oadvezh ar bevastalerioù.

lurette, **TA uvula palatina** ♦ **palatine uvula** ♦ **hugenn b.** Divilhenn gernennek, kreizer ha diaserzh, eus ar ouel stavn.

Luft : **maladie de Luft** ♦ **Luft's syndrome** ♦ **azoniad Luft** Seurtad miopatiezh kevret gant ur stad dreistkennevidel (asikted, treutadur, c'hwezennoù, goursec'hed, kaheristeñv, uhelaat ar c'hennevid diazez hep skoedusvorc'h neoazh); azoniad arzodet d'ur miarc'hwel a 'r mitokondri.

Lugol : **solution de** ~ ♦ **Lugol's solution** ♦ **dileizhenn b. Lugol** Dourzileizhenn iod da 1% hag iodidenn galiom 2%, arveret evel dilester ha dilouezer.

lumbago ♦ **lumbago** ♦ **1 loanost b. 2 lumbago** g. 1 Ent diresis, laur e traoñ ar c'hein (sl. *lombalgie*). 2 Anaev laurus e rannbarzh an dargreiz o tarvezout trumm da heul ur striv; lec'hiet da gentañ en tolzennoù kaherel dargreiz-kroazell, e seller hiziv al *l.* evel azon un disvellad el livenn pe an ezvout war dreñv eus gronn bouedennek un disk etre-melloù (*diskogad*) (sl. *hernie*).

lumen ♦ **lumen** ♦ **lumen g.** Unanenn luc'hgas (ML²T⁻³, arouez : lm), anezhi al luc'hgas ec'hodet ebarzh un ec'hongorn l steradian gant ur vammenn luc'h l c'handela read (sl. *brillance énergétique, candela, éclairement (lumineux), lux*).

luminescence ♦ **luminescence** ♦ **tre luc'hañ** Anvad genadel al luc'hec'hodiñ o c'hoarvezout pa zistro d'he stad diazez ur reizhiad bet argridet dre skinadoù luc'h (*luc'hareluc'hañ*, Gl. *photo-luminescence*), dre rannigoù c'hwimmet pe dre skinoù tredanwarel (*skindreluc'hañ*, Gl. *radioluminescence*), dre un tredanvaez (*tredan-dreluc'hañ*, Gl. *électroluminescence*) pe dre ur

gwered loc'honiell (*rimdreluc 'hañ*, Gl. *triboluminescence*), dre un dazgwered kimiek (*kimidreluc 'hañ*, Gl. *chimioluminescence*) pe ur gwezhevred (*bevdreluc 'hañ*, Gl. *bioluminescence*).

(-)**lumi-**

• *adaptation à la lumière* argeskediñ diouzh ar gouloù • *amplificateur de luminance* skedamplaer • *cathéter à double lumière* kateter divforzh • *centreur lumineux* stuc'henn vukañ • *coefficient d'efficacité lumineuse* gwelsked, gwezhiaer luc'hefedusted • *concrétion dans la lumière des voies digestives* fetisâd en oaled ar forzhioù koazhañ • *en basse luminance* ouzh ar skedoù izel, ouzh an isked • *faisceau lumineux* hordenn luc'h • *irradiation de contact dans la lumière d'une artère coronaire* skinata diastok en oaled un dalmerenn guruner • *l'intensité lumineuse de l'index* read luc'h ar steudenn • *la candela est l'unité d'intensité lumineuse* an unanenn luc'hskinread eo ar c'handela • *la lumière d'un organe en est la cavité centrale* oaled un organ eo ar gavenn greiz anezhañ • *la luminance d'un diffuseur parfait* sked un amstrewer derc'hek • *la luminosité des couleurs* perçues lugern al livioù a verzher • *luminance énergétique* gremmsked • *luminance (visuelle)* gwelsked • *lumière utérine* oaled ar grozh • *plage lumineuse* lijorenn luc'hus • *sens lumineux* gwelad al luc'hioù • *source lumineuse* mammenn luc'h.

lunatum, semi-lunaire, TA *os lunatum* ◇ *os lunatum* ◇ **loareg g. -où** Askorn eus renkad krec'h eskern an arzorn, etre ar skafeg (Gl. *scaphoïde carpien*, TA *scaphoïdeum*) hag an trizueg (Gl. *pyramidal*, TA *os triquetrum*).

lunule (de l'ongle), TA *lunula unguis* ◇ *lunula of nail* ◇ **loarig b. -où an ivin** Tachad sklaer loet e gwrizienn an ivin.

lupique ◇ ◇ **1 lupuzek** aa. **2 lupuzeg g. -eion** **3 lupuzel** aa. 1 Gant al lupuz. 2 Gouziviad al lupuz. 3 A-zave d'al lupuz.

lupoïde ◇ **lupoid** ◇ **1 lupuzvanek** aa. **2 lupuzvan g.** 1 Heñvel ouzh al lupuz. 2 Termen a gaver en termen *lupuzvanoù* kuñv *strewek* (Gl. *lupoïdes bénignes disséminées*), kenster da *sarkoidoù kroc'hen* (sl. *sarcoïdes cutanées*).

lupome, tubercule lupique ◇ **lupoma** ◇ **lupom g., torzhell b. lupuzel** Anaf elfennel al lupuz torzhellek, naouus dre ar vezañs en epiderm eus greun bihan arrott, melen gell, treuzluc'hus, mentet etre ur penn spilhenn hag ur bizenn, o kreskiñ gorrek hag o taskantañ e plakadoù (sl. *lupus tuberculeux*).

lupus érythémateux aigu disséminé, l. é. exanthématique, l. é. systémique, maladie de Kaposi ◇ **systemic acute lupus erythematosus** disseminatus ◇ **lupuz eritematus lemm strewek, l. e. eksantematek, l. e. lemm reizhiadel strewek, kleñved Kaposi** Anaez naouus dre un dispuilhad plakadoù eritematus persvok warno gourc'hennoù munut, kevret gant arzostoù, terzhienn, asikted ha treutadur, lec'hiadurioù liesel er flugez : lounezh, kalon (sl. *syndrome de Libman-Sacks*), nerveg, krezoù-skevent, teskad anafoù oc'h anataat reizhiadelezh ar c'hleñved; hiziv e renker al lupuz e-touez ar c'hleñvedoù unanhangaeel, ar c'hleñvedoù a'n hangaegemplezhioù hag ar c'hollagenozioù; dre ar c'hortikoidoù hag an hangaeastalerioù e c'hevner dedro ar c'hleñved hag ez ampeller an andizh.

lupus érythémateux chronique ◇ **lupus erythematosus, discoid lupus erythematosus** ◇ **lupuz eritematus henek** Dermatoloj naouus dre ur blakenn hevonnn ruz, un nebeut ensiladek, gourc'hennus, o skoanañ en he c'hreiz, sezet war ar parzhioù dizolo : fri, divvoc'h, divskouarn, brigenn, daouarn, ha war glaourgen ar genoù; deskrivañ a reer furmoù strizhkantet pe *diskoidel*, gant ensiladur hag hiperkeratoz muek ha kleizennadur sklerozek; ha furmoù *emdzhat*, diavas, darwazhus, o trediñ dre resmiadoù emledus hag argizus; anaez spegus, adfeilhus ha kuñv peurliesañ; dianav eo e arbenn.

lupus tuberculeux ◇ **lupus tuberculosis** ◇ **lupuz torzhellek** Seurtad boutinañ, liesstummañ ha, gwechall, kilversañ an dorzhellegezh kroc'hen, naouus dre vezañs al lupomoù (sl. *lupome*) o trediñ gorrek hag, a-wechoù, o vont d'un anaf angreizhus.

lupus : **chilblain** ~ ◇ **chilblain lupus** ◇ **lupuz milhervanek, milhervan g.** Seurtad lupuz eritematus henek sezet en daouarn hag en divskouarn, oc'h anadiñ war ur c'hroc'hen dulazek hag o reiñ da hemañ neuz ar milher.

lusitrope ◇ **lusitropic** ◇ **blimwezher** aa. O wellaat delaoskusted ha filusted ar c'haher kalon.

lusitropie ◇ **lusitropia** ◇ **blimwezher g.** Perzhded delaoskiñ ar c'haher kalon.

lutéinique ◇ **luteinic** ◇ **luteinek** aa. A-zave da gorf melen ar vierrez, sk. : *kist luteinek* (Gl. *kyste lutéinique*) kist ar vierrez evodet diouzh ar c'horf melen.

Lutembacher : **syndrome de** ~ ◇ **Lutembacher's syndrome** ◇ **azoniad Lutembacher** Kalonnaoued ganedigel naouus dre gevredet un isvoll mintrek hag ur c'hehented etre-kentezoù gant usvoll kef ha barroù talmerenn ar skevent.

lux ◇ **lux** ◇ **luks g.** Unanenn goulaouder (arouez : *lx*), anezhi luc'hgas 1 lumen dre metr karrez (sl. *éclairage (lumineux), lumen*).

luxation ◇ **luxation, dislocation** ◇ **disvellad g.** Koll padek a'r c'heñverioù reol etre daou dalbenn kenvellañ.

luxation dentaire ◇ **dental luxation, tooth dislocation** ◇ **disvellad (un) dant, diempradur g. (un) dant** Dilec'hiadur daraezien un dant diouzh e logig, o tevoudañ an distruj hollel pe darnel eus an amzantenn.

(-)**lux-**

• *deuxièmes phalanges en hyperextension et en subluxation* dreistastennet ha gouzissvellet an oñsoù krenn • *le poignet semble luxé* e hañval an arzorn bezañ disvellet • *luxations ou subluxations récidivantes* disvelladoù pe gouzissvelladoù adfeilhus • *malformation luxante de la hanche* kammeuziad disvellus a'l lez • *réduire une luxation* diren un disvellad • *subluxation postérieure de la tête cubitale* gouzissvellad war dreñv eus penn an helmo • *subluxation spontanée de la main* gouzissvellad emdarzh a'n dorn.

luxmètre ◇ **lux meter** ◇ **luksventer g. -ioù** Ardivink arveret da vuzuliañ ar goulaouder en ur poent eus an egor.

Luys : corps de ~, TA *nucleus subthalamicus* ◇ *subthalamic nucleus* ◇ *gronn g. endan-derc'hvel* Gronn louet loet a-is d'an derc'hvel, a-us d'ar steuñvenn du (sl. *ballisme, hémiballisme*).

lyase ◇ *lyase* ◇ *liaz g.* Anvad rumm an enzimoù o treluskañ torr an ereoù e-maez an oksidañ hag an dourranñ (sl. *dekarboksil-azoù, aldolazoù*).

Lyme : *arthritis* ou *maladie de ~* ◇ *Lyme disease* or *arthritis* ◇ *kleñved pe arzfo g. Lyme* (Kleñved deskrevet e 1976 er Connecticut, USA) Arzfo adfeilhus o tizhout ar c'henvelloù bras, diaraoget gant un eritem henek kilhataer, ambrouget gant erzerc'hadoù nerval (pilhongwriziennfo) pe kalonel (strafuilhoù er rehent kentez-kofig), kiriek dezhañ ur spiroket, *Borrelia burgdorferi*, enkoret gant un tarlask (*Ixodex vicinus*) oc'h erialañ ivez loened 'zo (an demmed); dre hangaegendreluc'hañ ameeun (ELISA) e reer an deznaou (sl. *érythème chronique migrateur, immunofluorescence*).

lymphadénopathie ◇ *lymphadenopathy* ◇ *gwerblennaoued g.* Anvad rumm kleñvedoù ar gwerblennoù.

lymphagogue ◇ *lymphagogue* ◇ **1 limfec'houlus aa. 2 limfec'holuzenn b.** 1 O kentraouiñ paridigezh al limf. 2 Danvezenn limfec'houlus.

lymphangiectasie ◇ *lymphangiectasis* ◇ *limfforzhusvoll g.* Bolc'hadur ar gwerblennoù (*gwerblennvozhell, Gl. adénolymphocèle*) hag ar gwazhied limf (*teuc'hellou limfel, Gl. varices lymphatiques*), stadet er broioù tomm pergen, kiriek dezhañ filar ar gwad, hag o tedreñ en elefantiaziz.

lymphangiectomie ◇ *lymphangiectomy* ◇ *limfforzhezvenañ* Dazbidañ ar gwazhied limf; al *limfforzhezvenañ diavas hollel* (Gl. *l. super-ficielle totale*), anezhañ dazbidañ holl wiad kellaouek ha lienstirenn endan-groc'hen an ezel tizhet gant an elefantiaziz.

lymphangiome ◇ *lymphangiome* ◇ *limfangiom g.* Angiom evodet diouzh ar gwazhied limf; al *l. kistek* (Gl. *lymphangiome kystique*), kist levrus ganedigel lieslog o tinodiñ peurliesañ er poull ustrebez, evodet diwar eginennoù kezivik gwazhied limfel.

lymphangioplastie, lymphoplastie ◇ *lymphangioplasty* ◇ *limfforzhatelviñ* 1 Gwezh amkanet da ratreañ pe da amsaviñ ar gwazhied limf. 2 Prederiañ an angreizhoù henek dre wehenniñ al limf diouzh ar parzhioù ma chag etrezek poentoù ma ve assuget, dre ebarzhiñ neudennoù sidan dindan ar c'hroc'hen.

lymphangiosarcome ◇ *lymphangiosarcoma* ◇ *limfangiosarkom g.* Yoc'henn yud leteñvel ouzh an hemangioendoteliom, evodet diouzh ar gwazhied limf goude ar bronnezvenañ dre benn ur c'hankr.

lymphangite, angioleucite ◇ *lymphangitis* ◇ *limfforzho g.* Tanijenn ar gwazhied limf; diforc'hiñ a reer al *l. kefel* (Gl. *l. tronculaire*), tanijenn ar c'hefioù limfel, al *l. gwriennel* (Gl. *l. radulaire*) o tizhout gwriizioù al limfforzhoù ebarzh ar flugez hag ar c'hroc'hen, al *l. rouedadel* (Gl. *l. réticulaire*) oc'h anafañ rouedadoù limfel an derm; *l. karkinomatus* a reer eus ur seurtad kankr a r skevent naouus dre vezañs kelligoù kankrel ebarzh al limfforzhoù eus gwiaed entremezel ar skevent.

lymphatique ◇ *lymphatic* ◇ **1 ~limf, limfel aa. 2 limfatek aa. 3 limfateg g.** 1 A-zave d'al limf, sk. : *gwazhied limf pe limfforzhoù* (Gl. *vaisseaux lym-phatiques*). 2 Gant al limfategezh 3 Gouziviad al limfategezh (sl. 2 *ganglion* pe *nœud lymphatique, lymphatisme*).

lymphatiques : vaisseaux ~ ◇ *lymph* or *lymphatic vessels* ◇ *gwazhied s. limf pe limfel, limfforzhoù l. (b.)* Kanolioù tanav o speurioù, enno trapigoù, a amred drezo al limf a-dreuz ar bevedeg, lodek er *reizhiad limfel* (Gl. *système lymphathique*), danav seurtad anezho : ar *g. l. degasat* (Gl. v. *l. afférents*) a zeu drezo al limf d'ar gwerblennoù, ar *g. l. ezkasat* (Gl. v. *l. efférents*) a ya diouto al limf silet (sl. 2 *ganglion* pe *nœud lymphatique, lymphé*).

lymphatisme, tempérament lymphatique ◇ *status lymphaticus* ◇ *limfategezh b., temz g. limfatek* Skritell lakaet war strafuilhoù teñval er vugeliezh : usvent an organoù limfoidel (huegoù, gwerblennoù, toazon), toazegezh korfel, gwelvded, gwaktet an neuzid (sl. *hyperthymie², scrofule*).

lymphe ◇ *lymph* ◇ *limf g.* Liñvenn diliv pe liv goularz oc'h amredañ dre ar gwazhied limf, o tont eus ar gwad, enni leukokit ha, dre feurioù izeloc'h, an un danvezennoù hag er gwad, anezhi ar rann ec'honekañ eus al liñvennoù ezcellig.

lymphoblastes ◇ *lymphoblasts* ◇ *limfoblast s.* 1 Bongelligoù al limfokit, dezho 15 µm treuzkiz; evit aozerion 'zo ez eus un hevelep rumm elfennoù eus ar c'helligoù rihellel, al *limfoblast* hag ar *mieloblast*. 2 Er gleñvedouriezh, kelligoù eus al leukemiezh lemm hag al limfoblastosarkom.

lymphoblastome ◇ *lymphoblastoma* ◇ *limfoblastom g.* Yoc'henn yud evodet diouzh ar gwerblennoù pe ar felc'h diwar neridigezh al limfoblast.

lymphoblastosarcome ◇ *poorly differentiated lymphosarcoma* ◇ *limfoblastosarkom g.* Sarkom naouus dre neuz limfoblastek ar c'helligoù o neriñ er gwerblennoù tizhet.

lymphocèle ◇ ◇ *limfvozhell b.* Fennad limf enkistet.

lymphocytaire : série ~ ◇ *lymphocytic series* ◇ *steudad b. limfokitel* Skour eus ar gwennac'had adalek al limfoblast betek al limfokit.

lymphocytémie ◇ *lymphocytaemia* ◇ *limfokitusriñ g., ellimfokit g.* Reñver limfokit er gwad; termen arveret a-wechoù evel kenster da *leukemiezh limfoidel* (sl. *leucémie lymphoïde chronique, leucocytose*).

lymphocytes ◇ *lymphocytes* ◇ *limfokit s.* Leukokit anhoskek bezant er gwad, ar mel hag an organoù limfoidel, renket etre div vent : *l. bras* etre ha 9 ha 15 µm treuzkiz, ha *l. bihan* etre 6 ha 9 µm, dezho ur gaoñell dev vigelc'hiek, teñval, hag ur c'hitoplasm skars gwerek, bazofil; al *l. bihan*, goude fraouaet gant un antigen, a dro en *immunokit* pe *kelligoù hangaec'hougonek*, arbennikaet

en erwezhiou hangaeel; hervez o c'hefridi, e tiforc'her al *limfokit B*, berrhoali (4 pe 5 deiz), gwezheriou an hangae dourennel, hag al limfokit T, douger an hangaeñ kelligel, hiroc'h o hoali (5 pe 6 miz) (sl. *cellules B, cellules thymodépendantes, cellules immunocompétentes, compétence immunitaire, immunité, lymphoïde : sys-tème ou tissu ~, mémoire immunologique*).

lymphocytes autoréactifs ◇ **autoreactive lymphocytes** ◇ **limfokit unannaouaer** Limfokit en araez da naouaat an unan-antigenoù.

lymphocytes cytotoxiques ◇ **cytotoxic lymphocytes** ◇ **limfokit kelligistrius** Limfokit en araez da zistrujañ kelligoù 'zo, anezho ur seurtad leukokit T (Sz. *cytotoxic T lymphocytes, CTL*), kelligoù K, kelligoù K genidik (Sz. *natural killer, NK lymphocytes*) (sl. *cellules K, cellules thymodépendantes, cellules tueuses naturelles, cytotoxicité*).

lymphocytes : test du transfert normal des ~ , TTNL ◇ **normal lymphocyte transfer test** ◇ **prouad g. treuzdoug reol al limfokit** Hentenn ergemennet a-raok un treuzplantadur organ evit andalañ kempadusted ar gwiaodoù etre roer ha roadour, anezhi sankañ e derm ar roadour kementadoù limfokit o tont eus un niver roerion; seul vihanoc'h eo an erwez stadet a-benn 24 pe 48 h ma 'z eo gwelloc'h ar wiadkempadusted.

lymphocytes : transformation des ~ in vitro, test de la transformation lymphoblastique ◇ **blast transformation of lymphocytes** ◇ **treuzfurmadur al limfokit in vitro, prouad an treuzfurmadur limfoblastel** Treuzfurmadur *in vitro* al limfokit bihan e kelligoù hangaec'hougonek (pe immunoblast, pe kelligoù blastek) goude keraezañ un antigen a zo hangaeet outañ an hinienn e teuont anezhi, prouad hemañ o talvezout 1) da andalañ ar wiadkempadusted : mar mesker *in vitro* limfokit div hinienn nad int ket gevellid unreek, ez eo seul vrasoc'h niver al limfokit treuzfurmet en immunoblast ma 'z eo kevaralloc'h antigenoù leukokitel an div hinienn, eleze ma 'z eo brasoc'h an digempad gwiaedel etrezo; 2) da zinoiñ an allergiezhoù garvel pe liael.

lymphocytes dénudés : syndrome des ~ ◇ **bare lymphocytes syndrome** ◇ **azoniad al limfokit noazh** Seurtad dibaot a zivig hangae kelligel ha dourennel, anezhañ anezerc'h antigenoù ar reizhiad HLA e gorre al limfokit, al limfokit T pergen, anaez treuzkaset er mod aotozomek enkilek, marvus bepred e bloavezhioù kentañ ar vuhez.

lymphocytome cutané bénin ◇ **lymphocytoma cutis benign** ◇ **limfokitom g. kroc'hen kuñv** Yoc'henn guñv ar c'hroc'hen, un-pe liesseuz, sezet war an dremm pe an organoù genel, o c'hoarvezout eus un hogennad limfokit.

lymphocytopoïèse ◇ **lymphocytopoiesis** ◇ **limfokitparañ** Furmiñ al limfokit.

1 lymphocytose **2 lymphocytose, lymphocytémie** ◇ **1 normal lymphocyte count** **2 lymphocytosis** ◇ **1 limfokitriñv g. 2 limfokitursiñv g., ellimfokit g.** 1 Feur al limfokit er gwad (ent vonan etre 1 500 ha 4 000/μl). 2 Reñver limfokit er gwad (sl. *lymphocytémie*).

lymphocytose infectieuse aiguë de Carl Smith ◇ **acute infectious lympho-cytosis, Carl Smith's disease** ◇ **ellimfokit lemm poreel Carl Smith** Anaez dianav e arbenn, arlakaet viruzel (enteroviruz), o tizhout dreist holl ar bugel 7-8 vloaz, naouus dre ur maeloù fric'hargadenn, un darc'hoal, ur gourellimfokit, a-wechoù un derzhienn argrenn hag un asikted; nac'hek eo erwez Paul ha Bunnel; pareañ a ra hep arlenad.

lymphocytotoxicité ◇ **lymphocytotoxicity** ◇ **1 limfokitpistriusted b. 2 limfokitpistriegezh** 1 Galloud da zistrujañ al limfokit; diaezet eo *prouad al limfokitpistriusted* war zistruj al limfokit douger d'un antigen gant an antikorf keñverek. 2 Galloud piaouet gant al limfokit (ar c'helligoù K) da zistrujañ ar c'helligoù o tougen un antigen allevek (sl. *cellules K*).

lymphocytotoxines ◇ **lymphocytotoxins** ◇ **limfokitotoksinoù l. (g.)** Danvezennoù en araez da zistrujañ al limfokit, peurgetket an antikorfoù piaouer d'ar galloud-se dinodet er gwadvez da geñver an hangaeñ unspesadel (izoleukoantikoroù), reoù anezho o wazhañ limfokit an hinienn he deus o faret (aotolimfokitotoksin), da skouer, da geñver kleñvedoù viruzel 'zo hag al lupuz eritematus.

lymphœdème ◇ **lymphoedema** ◇ **limf'houliñv g.** Gouliñv e dianlen steviadur al limfforzhiou.

lympho-épithélioma ◇ **lymphoepithelioma** ◇ **limfoepiteliom g.** Hanve an hueg o c'hoarvezout eus un epiteliom andi-forc'hek ensilet limfokit ennañ.

lymphogénèse ◇ **lymphogenesis** ◇ **limfparañ** Furmiñ al limf.

lymphographie ◇ **limfography** ◇ **limfforzhluniñ** Skinluniñ ar gwazhied limf hag ar gwerblennoù goude ensinklañ enno un Xdemerenn.

lymphohistiocytose familiale, réticulose hémophagocytaire ou hémophagique ◇ **familial haemophagocytic reticulosis** ◇ **limfohistiokitoz g. familhel, retikuloz g. hemofagokitel** Kleñved familhel o tizhout ar vugale yaouank a 'n div rev, naouus dre an derzhienn, an amwad, un avufelc'husteñv, ur c'heinelgellig, anafoù nerverl ha pilhonfo, un ensiladur limfohistiokitel strewek, ur gwadusvec'h lipid, gwadliñvoù hag un dedro herrek d'an andizh.

lymphoïde : système ou tissu ~ ◇ **lymphoid tissue** ◇ **reizhiad b. pe gwiad limfoidel** Teskad ar c'helligoù hag an organoù a zo en o dalc'h an erwezhiou hangaeñ spesadel, ouzh e ober : 1) al *limfokit*, ar bongelligoù ez int an disoc'h anezhañ hag ar c'helligoù deveret diouto (limfoblast) — diaes eo dec'havaelañ an ac'hadur anezho betek o zreuzfurmadur e kelligoù dewerc'her (immunokit) : al limfokit B ha T hag ar plasmokit; bezant emaint er gwad, el limf, er gwad kenglenel ha dreist holl en organoù limfoidel; 2) an *organoù limfoidel* ma tiwan, ma azv ha ma emdro al limfokit : toazon, mel eskern, gwerblennoù, huegoù, plakennoù Payer, divilhenn, derm ha tonenn ar glaourgennoù; o kewezhiañ strizh emañ reizhiad limfoidel ha reizhiad retikuloendotelel.

lymphokine ◇ **lymphokine** ◇ **limfokin** g. Glikoprotein hezilezh borc'het gant al limfokit toazonamlegat da geñver un eil keraez a 'n antigen int bet kizidikaet outañ hag a zelank erwezh an hangae kelligel; limfokinoù zo n'int ket spesadel d'un antigen (parenn heuder emdizh al leukokit, heuderenn enaoz an DNA, limfotoksin, h.a.); spesadel eo re all d'un antigen (parenn borc'het gant ar c'helligoù T harper, parenn dreuzdoug, h.a.).

lymphologie ◇ **lymphology** ◇ **limfouriez** b. Diskiblezh studi al limf hag ar reizhiad limfel.

lymphomatose ◇ **lymphomatosis** ◇ **limfomatoz** g. Anvad rumm an anaezioù naous dre uswe ar reizhiad limfel, kevret gant ur wadlimfokitegezh hag ur gourelwenn (*l. strewek pe leukemiezh limfoidel*), argrenn (*l. gouleukemek*), pe gant ur gwennriñv reol (*l. anleukemek*) (sl. *leucémie lymphoïde chronique*).

lymphome ◇ **lymphoma** ◇ **limfom** g. Yoc'henn o c'hoarvezout a wiad limfoidel rizhek, dinodet pe e-barzh organoù a zo enno an kez gwriad endeo pe e-barzh organoù all.

lymphome malin ◇ **malignant lymphoma** ◇ **limfom yud** Anvad stroll an holl neridigezhioù yud eus kelligoù an ac'hadoù limfokitel hag histiokitel : kleñved Hodgkin, al limfosarkomoù, ar retikulosarkomoù, kleñved Brill-Simmers, an tri c'hleñved-mañ diwezhañ o vezañ erdalet gant an termen *l. y. anhodgkinek* (Gl. *l. m. non hodgkinien*).

lymphome du manteau ou **de la couronne folliculaire** ◇ **mantle zone lymphoma**, **mantle cell lymphoma** ◇ **limfom ar vantell** pe **ar gurunenn** Seurtad limfom anhodgkinek o c'hoarvezout a limfokit bihan hag a gelligoù bihan askek (sl. *follicule lymphoïde, lymphosarcome*).

lymphome méditerranéen, **lymphome diffus du grêle** ◇ **Mediterranean lymphoma** ◇ **limfom kreizdouarel**, **limfom strewek ar vouzellenn voan** Anaez o tizhout tud yaouank genidik eus diazad ar Mor kreiz, naous dre un darc'hoal puilhek, barradoù laur kof hag un daralladur herrek eus ar stad hollek o tisoc'h, en desped d'an didorrou, gant ar marv a-benn etre 1 ha 4 bloaz; un azoniad eo o kevredañ ur misug pervezel ouzh ar glukid, ar protid, al lipid hag ar c'hevionennoù, ur gwadisevec'h kaliom ha kalkiom, a-geñver gant isteñv ar bodennoù pervez, ensiladur tonenn ar vouzellenn voan gant kelligoù limfoplasmokitel yud, arvez reticulosarkomatus eus gwerblennoù ar gandedenn, bezañs er gwad eus ur protein ezreol, anezhañ un tammad eus digorvelloù ponner an immunoglobulinoù A; kleñved a hañval bezañ unan e-touez kleñvedoù an digorvelloù ponner.

lymphopathie ◇ **lymphopathy** ◇ **limfanaez** g. Kleñved a 'r reizhiad limfel.

lymphopénie, **lymphocytopénie** ◇ **lymphopenia** ◇ **ollimfokit** g., **limfokitisriñv** Diouer limfokit.

lymphoprolifératifs : syndromes ~ ◇ **lymphoproliferative diseases** ◇ **azoniadoù pe anaezioù limfneradel** Stroll kleñvedoù yud naous dre baotidigezh ezreol al limfokit, gant pe hep an tremen anezho er gwad, kent pep tra al limfosarkomoù, makroglobulin-emiezh Waldenström, al leukemiezh limfoidel henek, al leukemiezh trikoleukokitel (sl. *immunoprolifératifs : syndromes* ~).

lymphorragie ou **lymphorrhée** ◇ **lymphorrhagia** ◇ **limfnaouez** b. Diver al limf e-maez al limfforzhoù e dianlen ur gloazad.

lymphosarcome, **lymphadénome malin**, **lymphadénosarcome**, **sarcome lymphoïde**, **lymphocytome malin** ◇ **lymphosarcomatosis**, **lymphosarcoma**, **lymphatic sarcoma** ◇ **limfosarkom** g., **limfosarkomatoz** g. Yoc'henn yud oc'h evodiñ eus ar gwerblennoù hag a-wechoù eus gwiadoù limfoidel ar felc'h, an avu, ar benvegad kozhañ, an eskern, h.a., o tasezañ hag o tedreñ d'un andiz herrek; er prantad diwezh, gant tremen ar c'helligoù yud e wisk ar gwad un arvez leukemek; d'ober ar yoc'henoù ez a pe limfokit bihan (*limfokitosarkom*), pe kelligoù heñvel ouzh al limfoblast, dezho kraoñelloù bras; lies rummatadur zo bet eus al limfosarkomoù, adalek hini Rappaport (1966) etre limfokitosarkomoù, limfoblastosarkomoù ha retikulosarkom andiforc'hek, diforc'hek ha plasmokitel, hini Kiel (1991) o renkañ al limfomoù anhodgkinek hervez derez o yuted, betek hini Aozadur Bed ar Yec'hed (2001) etre limfomoù B ha limfomoù T/NK (sl. *cellules B, cellules thymodépendantes, cellules tueuses naturelles*).

lymphoscintigraphie ◇ **lymphoscintigraphy** ◇ **skingannluniñ al limfforzhoù**, **limfforzhskingannluniñ** Skingannluniñ ar gwerblennoù hag ar gwazhied limf.

lymphoscrotum ◇ **lymph scrotum** ◇ **gousac'hlimfad** g. Elefantiaziz ar gousac'h, gant teuc'helloù limfel balirek.

lymphose ◇ ◇ **limfoz** g. Anvad rumm kleñvedoù anfoel ar gwriad limfel.

lymphostase ◇ **lymphostasis** ◇ **gourlimf** g. Gorrekaat pe astaliñ an amred er gwazhied limf.

lymphostimulation ◇ ◇ **limffraouaat** 1 Annoz parañ al limf pe al limfokit. 2 Treuzfurmiñ *in vitro* al limfokit e kelligoù blastek leteñvel ouzh ar c'helligoù hangaec'hougonek, o tarvezout pa azdoder d'an tiñvadennoù anezho danvezennoù 'zo evel ar fitohemaglut-inin, ar gwadvez antilimfokit pe un antigen a zo hangaet outañ an hinienn ez arzeuont anezhi (sl. *lymphocytes : transformation des ~ in vitro, sérum antilymphocyte*).

lymphotoxine, **facteur cytotoxique**, **facteur de nécrose tumorale bêta**, **TNFβ** ◇ **lymphotoxin**, **tumor necrosis factor beta**, **TNFβ** ◇ **limfotoksin** g., **parenn** b. **gelligipistriañ**, **parenn yoc'hennvarvennañ beta**, **TNFβ** Unan eus hanteradoù dourennel an hangae kelligel borc'het gant al limfokit toazonamlegat; distrujañ a ra ar c'helligoù a vez o keraezañ, hag int douger pe get d'an antigen ez eo bet kizidikaet outañ al limfokit.

lymphotrope ◇ **lymphotropic** ◇ **limfkerc'h** aa. O werediñ war ar gwriad limfel.

Lynch : syndromes de ~ ◇ **Lynch's syndromes** ◇ **azoniadoù Lynch** Kankr kolon-youlc'h andiaraoget gant ar polipoz, o tarvezout kentrat gant izili ur familh, treuzkaset er mod aotozomek enkilek.

lyoc, **lyophilisat oral** ◇ **lyoc** ◇ **liok**, **leizhlenad** g. **genaouel** Moustrad dewerc'het dre leizhlenaat (disec'hañ dre ziaezhennañ e gwezverk izel), o tileizhiñ herrek en halv.

lyonisation ◇ **lyonization** ◇ **lionaat** (Diwar anvenn an hilonioureuz saoz Mary F. Lyon, 1925-) ezniñvañ unan eus an daou gromozom X d'ur stad kenrat eus diorreadur ar rizhell venev.

lysat ◇ **lysate** ◇ **loezad** g. Dedaolad an traoñiañ hag an dileizhiñ kelligoù pe bakteri dre al lizinoù.

lyse tumorale : **syndromes de ~** ◇ **tumor lysis syndromes** ◇ **azoniadoù ar yoc'hennloezañ** Teskad an anadennoù o tarvezout da heul loezañ ur yoc'henn yud ec'honek dre benn ruridigezh kementadoù bras danvezennoù a orin kelligel e-barzh amredad ar gwad, peurgetket un akidoz kennevidel gant gwadusvec'h kaliom, fosfor ha trenkenn urek, en ervez d'un dedro marvus.

lysergide, LSD ◇ **lysergide, LSD** ◇ **lizergid** g., **LSD** Bredvireer trezerc'heiat kevanaozet diwar un alkaloid eus druilh ar segal, hep arver mezegel ken, boaziet gant kaezhiaded 'zo.

lysine ◇ **1 lysin 2 lysine** ◇ **lizin** g. 1 Anvad rumm an antikorfoù o loezañ kelligoù (ar gwad pergen) ha bakteri. 2 Amindrenkenn vevret (arouez : *Lys* pe *K*) parzhiat er proteinoù.

lysis ◇ **lysis** ◇ **liziz** g. Diwresteriñ gorrek war lies devezh, evel a c'hoarvez gant an tifoid da skouer.

lysosomes, phagosomes ◇ **lysosomes** ◇ **lizozomoù** l. (g.) Rannigoù eus protoplasm ar c'helligoù, o vont da uniañ gant ur vakuolenn, da skuilhañ enni o endalc'had (enzimoù eus ar rizh hidrolaz, al lizozim ha gwezherioù proteek bakterilazh) ha da loezañ an dilerc'hiou kennevid hag ar bakteri gronnet enni; gwezherioù an difenn kelligel hag ar fagokitoz, eo al *l.* bezant e rezh greunennadoù ar granulokit neutrofil hag ar makrofag; pa vez darallet koc'henn al *l.* e skign an hidrolazoù ha lazhañ ar gellig.

lysozyme ◇ **lysozyme** ◇ **lizotip** g. Isrann d'ur spesad bakteri desavelet dre he c'hizidigezh ouzh ar bakteriofag (sl. *biotaxie*).

lysoypie ◇ **phage typing** ◇ **fagrisha** Kalvezder hennadiñ ar bakteri dre araez o c'hizidigezh ouzh ar bakteriofag.

lysozyme ◇ **lysozyme** ◇ **lizozim** g. Enzim en araez da zistrujañ spur gelligel ar bakteri bet degerc'het gant lizozomoù ar fagokit, gwezher difenn anspesadel ar bevedeg, bezant e meur a wiad hag a liñvenn vededel.

lytique ◇ **lytic** ◇ **1 ~loezañ, loezus** aa. **2 loezadel** aa. 1 O tec'han al loezañ. 2 A-zave d'al loezañ.

(-)*lys*-, (-)*lyt*-

• *action lytique* loezadur • *adipolyse, lipolyse* behinloezañ • *apicolyse* kernezglenañ • *bactériolysine* bakteriolizin • *bactériolytique* bakteriloezadel • *cytolysse hépatique* kelligloezañ avu • *électrolyse* tredanrannañ • *lyse musculaire* kaherloezañ • *spasmodique* enebandag • *substance capable de lyser les caillots sanguins* danvezenn en araez da loezañ ar c'haouled gwad. • *spasmolytique* enebandag • *substance capable de lyser les caillots sanguins* danvezenn en araez da loezañ ar c'haouled gwad.

M

McArdle-Schmid-Pearson : maladie de ~, **glycogénose type V** ◇ **McArdle's syndrome** ◇ **kleñved McArdle, glikogenoz g. rizh V** Kleñved enzimatek hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, anezhañ ur glikogenoz naouus, *ent klinikel*, dre ur skuizhadusted vuiek, glazoù laurus diouzh ar striv, bezañs miogloblin en troazh; *ent vevoniel*, dre ezvezañs ar gwadusvec'h trenkennoù laktek ha piruvek e-kerz al labour kigennel dindan heskwad; kiriek d'an anaez eo yoc'hadur kigennel ar glikogen, skoilheth an ec'haozañ anezhañ gant ezvezañs un enzym, ar fosforilaz kaherel.

McBurney : **incision de ~** ◇ **McBurney's incision** ◇ **flañchadenn b. McBurney** Skejañ speur ar c'hof a-groaztalenn e sell d'an divilhennzevenañ, anezhañ digeriñ *a*) a-veskell lientstirenn ar gigenn veskellek diavaez, *b*) a-dreuz, en ur skarat o gwiennoù, ar gigenn veskellek diabarzh hag ar gigenn dreuz, *c*) azerc'h, an ampeleñ; e se, dre gengroaziañ al linennoù krafaelañ, e parraer ouzh an torogadoù.

McBurney : **point de ~** ◇ **McBurney's point** ◇ **poent McBurney** Poent a-geñver gant enlenad an divilhenn ouzh ar sac'henn, loet a 4 da 5 cm eus ar spernenn glun araok uhelañ, war ul linenn treset etrezi hag ar begel; arouez an divilhennfo eo al laur pa bouezer war ar poent-se.

McDuffie : **syndrome de ~** ◇ **McDuffie's syndrome** ◇ **azoniad McDuffie** Anaez, paotoc'h gant ar merc'hed, naouus ent klinikel dre ar gevredet eus erzerc'hadoù kroc'hen muiek e par an izili (krugennoù sklaer en o c'hreiz, maelennoù azgell, purpura) hag arzostoù kantreidik dibad; o tedreñ etrezek ar pare goude lies resmiad terzhiennek gant laurioù kof; en ervez da rouestlañ diac'houde e rezh ur bloueigfo etrekorrwazhiedel; er gwadveiz ez eo izel feur ar glokaenn; ar bevsav a ziskouez anafoù gwazhiedfo allergiek.

McEwen : **épine tibiale de ~** ◇ **draenenn b. skin McEwen** Balirad askorn a stader war enlenva stagell gengostezel a-skin glin ezkromm ar grennarded.

McGinn et White : **signe de ~** ◇ **McGinn-White sign** ◇ **arouez b. McGinn-White** Arvez eus ar c'halonvarrwezd naouus dre gevredet ur wagenn S er 1^{añ} amdreugad hag ur wagenn Q (e ser ur wagenn T tuginet) en 3^e amdreugad, oc'h erzerc'haat dehouadroar ar galon diouzh he ahel diahed, a stader e degouezh ar galon skeventien henek (sl. *cœur pulmonaire*).

McLeod : **maladie de ~** ◇ **McLeod's disease** ◇ **kleñved McLeod** Pistriadur gant greun *Argemone mexicana* stadet en India hag e Kreizafrika, erzerc'hat dre gouliñvoù an izili traoñ ha skorted kalon; nes e ve d'ar beriberi (sl. *béribéri*).

McLeod : **syndrome de ~** ◇ **Sawyer-James disease** ◇ **azoniad McLeod, azoniad Sawyer-James** Azoniad naouus dre un dreistsklaered skevent untu, hollek pe kantet en un dolbezenn, oc'h anadiñ war ar skinlunioù; en taread sklaeroc'h ned eo ket dardennet ar skeventenn met, en eneb alies, angrizet da heul steviadur ar c'horrvronkez trobarzhel endra van reol ar bronkez bras ha leiaet ken ar gwenterezh ken eroueriadur ar skevent; strafuilhoù o c'hoarvezout alies evel arlenad da vronkezskaventadoù grevus untu eus ar bugelvezh kentañ.

McMurray : **intervention ou opération ou ostéotomie de ~** ◇ **McMurray's operation or procedure** ◇ **gwezh g. pe askornenbenañ McMurray** Prederiadur surjiñel al lezartroz, anezhañ, goude un askornenbenañ etre an trovalegoù, treuzdodiñ an askorn morzhed war ziabarzh d'an dalpenn.

McMurray : **manœuvre de ~, signe du déclic** ◇ **McMurray's sign** ◇ **kefleuñvad g. McMurray, arouez b. an dislug** Ar glin o vezañ pleget, e c'houlanker loc'hadoù c'hwelañ, nesaat ha pellaat ouzh ar c'har hag an troad, hep pe gant astenn gorrek a'r c'har; ur stlakad merzhet e par diabarzh ketal ar c'henvell zo anezhañ arouez un anaf e korn adreñv kreskenn ar glin.

macération ◇ **maceration** ◇ **1 meizhiañ, meizhiadur g. 2 mouediañ, mouediadur g.** 1 Angevezh a zewerc'her dre lezel da soubañ en dour yen danvezennoù struzhel pe loenel war-benn douhenniñ ar gwezhuzennoù anezho. 2 Termen arveret er Vezekniezh lezennel da verkañ an daralladur o c'hoarvezout gant kroc'hen palvoù ha solioù ar c'helanoù bet manet pell amzer en dour, aet o epiderm arwenn, tevaet ha roufennet hag o tistagañ tamm ha tamm diouzh an derm; gant derez ar mouediañ e tastumer keal arnesadek eus pad ar soubadur; an un termen a ra gantañ an amiegourion er c'herienn *krouell mouediet* (Gl. *fætus macéré*) da aroueziñ ur grouell varv ezvountet goude hirvenel el liñvenn amnionel.

Mach : **syndrome de ~, syndrome d'œdème cyclique idiopathique** ◇ **Mach's syndrome** ◇ **azoniad Mach, azoniad ar gouliñvoù kelc'htroek hennadek** Azoniad naouus dre goeñvadur hollek an holl wiadoù hag ar c'hemer pouez herrek ha

müiek diwar azdalc'h dourholenel, o tarvezout gant ar vaouez e dibenn ar c'hor miziaouel hag el loadur war sav; kevret e vez ivez asikted, glazoù, klopnadoù, troazhisvorc'h, goustivadur henek gant rearver laoskuzennoù, kizidigezh ouzh ar c'henniñvoù bredkantaezel; hag int efedus ouzh ar gouliñvoù, e tevoud an troazhisvorc'herioù ur gwadisec'honad hag un usvorc'h aldosteron hag hormon eneptraosheiat (sl. *obésité d'eau et de sel, obésité paradoxale avec rétention d'eau*).

Machado Guerreiro : *réaction de* ~ ◇ **Machado Guerreiro test** ◇ **proud pe dazgwered Machado Guerreiro** Dazgwered dastrann ar glokaenn arveret da zeznaouiñ furmoù henek kleñved Chagas (sl. *Chagas* : *maladie de* ~).

Machado Joseph : *maladie de* ~ ◇ **Machado Joseph's disease** ◇ **kleñved Machado Joseph** Dic'henezhadur hêrezhel livenn-ilpenn o tizhout familhoù portugalat an Açores (d'ober anvad an anaez eo aet anvennoù div familh eus an inizi), treuzkaset er mod aotozomek trec'hek; an arouez pennañ eo an ankedre ilpennel oc'h anadiñ goude an oad a 20 vloaz.

mâchonnement ◇ **machonnement** ◇ **mandrouilhat, mandrouilhad** g. Fiñv diarzoug diastal ar c'haved a stader en anaeziou empenn 'zo.

macroamylase ◇ **macroamylase** ◇ **makroamilaz** g. Kemplezh keurvolekul diwar ere un amilaz ouzh ur protein, hemañ o vezañ pe un immunoglobulin A, pe ur glikoprotein, re ec'honek da vezañ silet gant al lounezh ha kiriek d'ur gwadusvec'h amilaz.

macrobiotique ◇ **macrobiotics, macrobiotic diet** ◇ **makrobiotik** g. Doazhadur mezhurel a orin japanat soliet war damkaniezh ar yin hag ar yang.

macrocéphalie ◇ **macrocephalia, macrocephaly** ◇ **keurgloppenengezh** b. Reñver kleñvedel ec'honad ar c'hlopenn (sl. *hydrotcéphalie, mégacéphalie*).

macrocheilie, macrochilie ◇ **macrocheilia** ◇ **keurweuzegezh** b. Usvent an divweuz dre benn an usteñv pe ul limfangiom strewek (sl. *cheilite granulomateuse*).

macrochirie ◇ **macrocheira** ◇ **keurzornegezh** b. Kammneuziad anezhi usvent an daouarn.

macrocytes ◇ **macrocytes** ◇ **makrokit** s. Eritrokit a zo o zreuzkiz etre 9 ha 12 µm e-lec'h 7 µm hag o ec'honad dreist 110 µm³.

macrocytose ◇ **macrocytosis** ◇ **makrokitoz** g. Bezañs makrokit er gwad.

macroductylie ◇ **macroductylia, macroductily** ◇ **keurviziegezh** b. Kammneuziad anezhi usvent un pe lies biz.

macrodontie, mégalodontie ◇ **macrodontia, macrodontism** ◇ **keurzentegezh** b. Ezreolder neuziad anezhañ dent usventek (sl. *dysharmonie dentomaxillaire*).

macrogénitosomie précoce, protéléiose, virilisme précoce ◇ **macrogenitosomia praecox** ◇ **keurc'hanadkorfegezh** b. **kentrat** Kentrated an diorren korfel ha ganadel pergen gant ar baotredigoù (bugale Herkules); arzodet eo bet d'ur yoc'henn a 'r c'hourjadenn pe ar c'horfoù bronnheñvel, pe c'hoazh d'ur yoc'henn a 'n uslounezhenn pe a 'r gwagrennoù genel; anaez a dizh a-wechoù ar merc'hed, ha dec'han neuze gourevegezh ha kreñvegezh.

macroglie ◇ **macroglia** ◇ **makroglia** g. Rann eus an neuroglia a orin ektodermel o c'hoarvezout eus an astrokit hag an oligodendrokit.

macroglobuline ◇ **macroglobulin** ◇ **makroglubulin** g. Globulin 900 000 d e dolz mol, 19 S e arstalenn gouzediñ, monoklonel, nes e luniad da re an immunoglobulin M (IgM) (sl. *immunoglobuline, constante de sédimentation*).

macroglubulinémie ◇ **macroglubulinaemia** ◇ **1 gwadvakroglubulinegezh** b., **makroglubulinemiezh** b. **2 makroglubulinwadvec'h** g. 1 Bezañs makroglubulin e plasma ar gwad. 2 Feur makroglubulin er gwad; stadet e vez un usvec'h argrenn en un niver a gleñvedoù (kirroze, azoniadoù nefrotek, avufo henek, lupuz eritematus, mononukleoz poreel); feurioù uheloc'h a vez eilvedel da gankroù 'zo (epiteliomou, sarkomou) ha d'an tripanozomiaz; ar feurioù uc'hek a gaver en un anaez a ziskouez bezañ kentael : *makroglubulinemiezh hennadek Waldenström*, kleñved ar reizhiad retikulolimfoidel, marvus, o tedreñ gorrek, naouus dre un amwad, gwadliñvoù, usvent an avu, ar felc'h hag ar gwerblennoù, un elwenn hag ur gourstizh gouzediñ; ar gwad, uhelaet e dolz hag e c'hludegezh, zo ennañ un immunoglobulin M (IgM) monoklonel borc'het gant plasmokit evodet eus al limfokit B (sl. *dysglobulinémie, immunoglobuline, lymphoproliféra-tifs : syndromes* ~).

macroglissie ◇ **macroglissia** ◇ **teodusvent** g. Kresk müiek ec'honad an teod, o tevoudañ a-wechoù an erlink anezhañ emaez ar genoù.

macroglissite ◇ **macroglissitis** ◇ **teodazoued** g. Morfer gant koeñvadur müiek an teod.

NOTENN : Kinnig a ran arverañ Br. *azoued* (sl. GMB 32, v° **aouid**) evit arouezañ kevreted ar fo hag ar c'hoañv.

macrognathie ◇ **macrognathia** ◇ **keurc'havedegezh** b. Usvent ar c'haved.

macrolides ◇ **macrolides** ◇ **makrolideier** l. (g.) Stroll bevastalerioù a ranner etre ar *m. gwir* (eritromikin, oleandromikin, spiramikin, h.a.) hag ar *m. kerentiet* (linkomikin ha klindamikin, a renker e kevrennad al *linkozamideier*, virginiamikin ha pristinamikin, renket e kevrennad ar *streptogramineier*); gwerediñ a ra ar *m.* war ribozomou ar bakteri dre skoilhañ ouzh eradur an amindrennoù ha kresk an hadenn; nes eo skalfad o gweredrezh ouzh hini ar penikillineier.

macromélie ◇ **macromelia** ◇ **1 keurezelegezh** b. **2 keurvoc'hegezh** b. 1 Kammneuziad anezhi ushed un ezel (Gr. μέλος) 2 ezreolder neuziad o c'hoarvezout eus usvent an divvoc'h (Gr. μήλα).

macromère ◇ **macromer** ◇ **makromer** g. Blastomer a vent vras eus parzh struzhel ar vi frouezhiget (sl. *blastomère, micro-mère*).

- macromolécule, haut polymère** ◇ **macromolecule** ◇ **keurvolekul** g. -ioù & s. Molekul uhel kenan e dolz mol (dreist 100 000 d); keurvolekul eo an DNA, ar mezelloù; n'eo ket spizet mat an ardrezva etre ar molekul bihan hag ar c'heurvolekul (o vont betek lies dekmilion d, ar viruzoù protein da skouer).
- macroorchidie** ◇ **macroorchidism** ◇ **keurglidennegezh** b. Ezreoder neuziad, anezhañ usvent an divgell.
- macroparéite, paréite granulomateuse** ◇ **boc'hfo** g. **granulomatus, boc'hazoued** g. Koeñv ur voc'h (Gr. *παρεΐά*) pe an div, stadet a-wechoù e ser azoniad Melkersson-Rosenthal (sl. *cheilite granulomateuse, Melkersson-Rosenthal : syndrome de ~*).
- macrophages** ◇ **macrophages** ◇ **makrofag** s. Anvad roet d'an histiokit en o frantad fagokitañ, alese o renkadur e-touez ar fagokit (sl. *histiocytes, phagocytes*).
- macrophages : syndrome d'activation des ~** ◇ ◇ **azoniad blivaerezh ar makrofag** Nerzhadur gwerederezh ar makrofag gant viruzoù pe bakteri 'zo e devoud un daolenn glinikel c'hrevus : avufelc'husvent gwresterek, amwad, olgwenn hag olpladanoù, gwadusvec'h triglikeridoù ha kolesterol, *eritrofaqiezh* pergen (sl. *érythrofaqocytose*).
- macrophagocytose** ◇ **macrophagocytosis** ◇ **makrofagokitoz** g. Deloezañ an dilerc'hioù kelligel (livegennoù gwad, draillhennoù kelligoù ruz pe gwenn) gant ar makrofag.
- macropie, macropsie, mégalopsie** ◇ **macropsy** ◇ **gwelusvent** g. Kammzerc'h oc'h ober gwelout brasoc'h an traoù.
- macropodie, mégalopodie** ◇ **macropodia** ◇ **keurdroadegezh** b. Kammneuziadur anezhi usvent an treid.
- macroprosopie** ◇ **macroprosopia** ◇ **keurfasegezh** b. Kammneuziad anezhi reñver diorreadur ar fas.
- macroscopique** ◇ **macroscopic** ◇ **meurselladel** aa. Merzhadus d'ar sell diglav (sl. *microscopique*).
- macroscélie** ◇ **macroscelia** ◇ **keureskeregezh** b. Kammneuziad anezhi usvent an divesker.
- macroscotomie, macrosomie** ◇ **macroscotomie, macrosomia** ◇ **keurgorfegezh** b. Seurtad keuregezh, naouus dre an tevder reñverek eus pep parzh eus ar c'horf (sl. *acromégalie, gigantisme, gigantisme cérébral*).
- macrosomie adiposogénitale, syndrome de Christiansen** ◇ **macrosomia adiposa congenita** ◇ **keurgorfegezh vehinganadel, azoniad Christiansen** Anaez nemedennek o tizhout ar vugale, naouus dre ar borderd hag ur reñver kreskiñ, a ve kiriek dezhañ ur miarc'hwel a 'r gaenuslounezhenn hag an toazan.
- macrostomie** ◇ **macrostomia** ◇ **genaouusled** g. Ezreolder dibaot kenan a 'r fas, anezhañ ur skarr un- pe daoudou diwar freilh an divwezh, oc'h astenn a-galz faout ar genoù.
- macrotie** ◇ **macrotia** ◇ **keurskouarnegezh** b. Kammneuziad anezhi reñver diorreadur an divskouarn.
- Macruz : indice de ~** ◇ **Macruz's index** ◇ **ditourenn** b. **Macruz** Delun kinniget evit spizañ deznaoue usteñv ar c'hentez kleiz pe dehou : keñver etre pad gwagenn P ar c'halonvarrwezad ha pad an arroud PR; ent reol emañ etre 1 hag 1,6; muiet e vez gant usvent ar c'hentez kleiz, leiaet gant usvent ar c'hentez dehou, reol pa vez usventek an daou gentez.
- macula, macula lutea, TA macula retinae** ◇ **macula retinae** ◇ **brizhenn** b. **al luc'hsae** Blein adreñv al luc'hsae dezhañ arvez ur bokenn arvelen hirgelc'hiek azremm he ahel bras, en he c'hreiz ur pukad, ar *rioul kreiz* (TA *fovea centralis*); er vrizhenn emañ al bemmed weled en he gwellañ.
- macule** ◇ **macula** ◇ **1 maelenn** b. **2 brizhenn** 1 (Kroc'henouriezh) anaf elfennel anezhañ ur vrizhenn ruz, anvalirek, diverket gant ar pouezañ. 2 (Korfadurezh, Skouarnouriezh) tevaenn hirgelc'hiek en epitelienn ar grozhig (*b. ar grozhig, TA m. utriculi*) hag ar sac'hig (*b. ar sac'hig, TA m. sacculi*), enni an otolit (pe statokoni) hag ar c'helligoù skiantennel (outo ar stereokil), aplud nervenn ar sac'hig (TA *nervus sacularis*) hag an nervenn grozhig-gloestr (TA *nervus utriculo-ampullaris*).
- maculopathie** ◇ **maculopathy** ◇ **brizhennaoued** g. Darallad brizhenn al luc'hsae.
- Maddock : syndrome de ~** ◇ **Maddock's syndrome** ◇ **azoniad Maddock** Skorted dibarek ar c'hougorfenn : divigat eo borc'hañ ar gonadostimulin hag ar c'hortikotrofin endra van reol borc'hañ an tireostimulin; ent klinikel e stader ur skorted c'hanadel gant asikted, iswask talmerel ha gwadisvec'h glukoz.
- Maddox : baguette de ~** ◇ **Maddox rod** ◇ **gwialenn** b. **Maddox** Trevnad optik, anezhañ gwer rizenet oc'h ober gwelout ur pik luc'h e rezh ur skeudenn linennek, embreged da studiañ ar gwelad daoulagadel ha da zinoiñ al loakrerezh enkelat (sl. *ésophorie*).
- Maddox : croix de ~** ◇ **Maddox scale** ◇ **skeul pe kroaz Maddox** Bizell dereziet kroazvanek amkanet da andalañ al loakrerezh enkelat.
- Madura : pied de ~, fungus du pied** ◇ **Madura's foot, fungus foot** ◇ **troad** g. **Madura, funguz** g. **an troad** Miketom an troad eus ar seurtad *maduromikoz*, erzerc'hat dre usvent muiek an troad, warnañ gouliezoù foueek ha treugoù fic'h; e riskl d'un dedro marvus anez ma ambider (sl. *maduromycose*).
- maduromycose, hypomycétome** ◇ **maduromycosis** ◇ **maduromikoz** g. Seurtad miketom, a zo an troad Madura ar furm rizhek anezhañ, naouus dre c'hreun amparet gant edañvennoù mikeliom ec'honek o furmiñ peurliesañ klamidiospor; eus ar spesadoù *Madurella mycetomi, Leptosphaeria senega-lensis* hag *Allesscheria boydii*, a gerentiad gant ar Maduromiket, e vez peurliesañ ar foueou arvevat.
- Maffucci : syndrome de ~** ◇ **Maffucci's syndrome** ◇ **azoniad Maffucci** Anaez ganedigel naouus dre gevreted angioù, gwazhiennusvollou ha kondromoù muiek e par ar bizied dorn ha troad en ervez da zedreñ e kondrosarkomoù.

- magistral** ◇ **magistery**, **magistral** ◇ **mestrel** aa., **mestr-** A-zivout un angevezh, un ordrenañ, un ordren a zo diferet gant ar mezeg ar genaoc anezho hag a zle bezañ erounezet en arbred gant an apotiker, sk. : *mestrangevezh* (Gl. *préparation magistrale*).
- magnésémie**, **magnésiémie** ◇ **magnesaemia** ◇ **gwadvec'h g. magneziom**, **magneziomwadvec'h g.** Feur ar magneziom er gwad, reol etre 0,8 hag 1,3 mmol/l, eleze 22 mg/l gwadvec'h keitat.
- magnésium** ◇ **magnesium** ◇ **magneziom g.** Elfenn gimiek (arouez Mg) a niverenn atom 12, metal skañv danvezet e rezh kendeuzadoù er greanterezh (en aerlestrsaverezh); direer kreñv, dre gediañ ouzh an oksigen e par un oksidenn stabil tre, ar vagnezia (MgO); letañvel e roll er c'hlorofil ouzh hini an houarn en hemoglobin; sellet evel gourzhaler ouzh ar c'halkiom er bevedeg, hag erskrivet er yac'hadurezh evit leiaat ar vroudadusted nervgaherel; e drefennañ a reer er furm sulfat da barraat ouzh strafuilhoù ar gorvez kofigel en angwaziad lemm ar c'haheer kalon; gant an troazhusvorc'herioù e vez riskl ur gouvec'h magneziom (ha kaliom).
- magnésiurie** ◇ **magnesiuria** ◇ **troazhvec'h g. magneziom**, **magneziomdroazhvec'h g.** Feur magneziom en troazh, reol an ezvevennañ anezhañ etre 0,08 ha 0,20 g. (3,3 ha 5 mmol) dre 24 h.
- magnétocardiographie** ◇ **magnetocardiography** ◇ **kalonwarellwezañ** Lerc'hwezañ gwarellvaez ar galon.
- magnétothérapie** ◇ **magnetotherapy** ◇ **gwarellgurañ** Arver yac'hadel ar gwarelloù.
- Mahler : signe de** ◇ **Mahler's sign** ◇ **arouez b. Mahler** Arouez abred eus gwazhiennfo an izili traoñ goude ar gwilioud, anezhi buanaat ar poulz a zeiz da zeiz (*pouls war bign*, Gl. *pouls grim pant*).
- maïeuticien**, **-ienne** ◇ **midwife** ◇ **amieg g. -eion**, **amiegez b. -ed** Embregour diplomet oc'h eveshaat an dougerezed, ouzh o amelañ e-pad ar gwilioud hag o reiñ an arouelioù kentañ d'an nevezc'hanidi.
- NOTENN : A-henvoaz eo merc'hed a skoazelle ar merc'hed all da wilioudiñ. Abaoe dibenn an 20^e kantved avat e tebarer an diplom d'ar baotred ivez, alese ur gudenn anvadurel. Er broioù saoznek, e talc'her da voaziañ *midwife* en div reizh benel ha gourel. Er broioù gallek, goude ober da gentañ gant *homme sage-femme* e stagad, e-tro 1980, da arverañ ar gourel *maïeuticien* hag ar benel *maïeuticienne* e-kichen an anvad boas *sage-femme*. Eeunoc'h eo bet e brezhoneg, pa spiras lemel azon ar benel diwar ar termen hengouel *amiegez* (sl. La-08 17, La-16 354-355).
- maigreux** ◇ **slenderness** ◇ **treuted b.** Steuz kadavioù behin ar bevedeg, kevret a-wechoù gant istevn an tolzennoù kaher hag ar flugez; an *dreuted c'houghorfenel* (Gl. *maigreux hypophy-saire*) zo kiriek dezhi skorted ar rakgoughorfen.
- main** ◇ **hand** ◇ **dorn g. -ioù**, d. : **daouarn** Parzh pellek an ezel krec'h, organ an teuta hag ar gavaelañ, anezhañ un talbenn arak, ar palv, bevennet gant ar c'hourbozenn hag ar c'houvozen, hag un talbenn adreñv, ar c'hil; d'ober an atel anezhañ ez a eskern an arzorn (Gl. *carpe*), ar c'hreizdorn (Gl. *métacarpe*), an oësoù (Gl. *phalanges*), isrannet o unan en o. *nezek* (Gl. *p. proximales*), o. *krenn* (Gl. *p. médiales*), o. *pellet* (Gl. *p. distales*) (sl. *carpe*, *hypothénar*, *métacarpe*, *paume*, *thénar*).
- main bote** ◇ **clubhand** ◇ **dorn kamm** Lakadur disreol ganedigel an dorn e-keñver an arvrec'h, a zeskriver daou seurtad anezhañ : an *dorn ezkamm* (Gl. *m. b. cubitopalmaire*, Sz. *manus valga*), e dianlen pe anpar parzh traoñ an helmo, pe ished ar c'higennoù pleger o tevoudañ stouadur an dorn war helmo ha plegadur ar palv, an *dorn enkamm* (Gl. *m. b. radiopalmaire*, Sz. *manus vara*) diwar anpar holl pe darnel ar werzhid, oc'h ober d'ar palv plegañ ha stouñ war werzhid, disneuiziadur kevredet alies gant ezvezañs ar meud hag angwe an nervenn awerzhid.
- main creuse : signe de la ~** ◇ ◇ **arouez an dorn kleuz** Kleuzded ar palv oc'h anadiñ e lakadur an dorn en un dalenn azerc'h hag asaehz, ezreolded pe tantek ha padek, pe o c'hoarvezout pa vez diskalfet ent oberiat pe gouzañvat ar bizied, test neuze d'un tizhad pikermennek.
- main d'accoucheur**, **main de Trousseau** ◇ **obstetrician's hand** ◇ **dorn gwiliouder** Lakadur dibarek an dorn a stader en andag an detaniezh : ar bizied dargrezet, stardet ur re ouzh ar re all, dambleget war an arzorn, ar palv kleuzet.
- main de prédicateur** ◇ **Charcot's hand** ◇ **dorn prezeger**, **dorn Charcot** Lakadur war astenn an oëñs nezek ha war bleg an oësoù krenn ha pellek, astenn dasstrizhek an dorn war an arzorn, test da seizi an nervennoù a-helmo ha kreizer, arouez vezus a gavnvelad.
- main de singe** ◇ **monkey's hand** ◇ **dorn marmouz** Dorn plat diwar gaherisvent kigennoù ar c'hourbozenn hag ar c'houvozen war un dro gant kilwintad askorn kentañ ar c'hreizdorn, o tic'hallusaat keharpañ ar meud, ar mod gavaelañ nemetañ o chom plegañ ar bizied all war ar palv, nammdded stadet en istevnoù a rizh Aran-Duchenne, Gombault-Dejerine hag e seizi an nervenn greizer.
- main en griffe** ◇ **ape hand**, **claw hand** ◇ **dorn kraban** Distummadur an dorn diwar gaherisvent ar c'higennoù etreeskernel, ar c'higennoù pleger, chomet bonan, o terc'hel plegat an daou oëñs diwezhañ ha dreistastennet an oëñs nezek.
- main en lorgnette** ◇ **opera-glass hand** ◇ **dorn darampibek** Distummadur an dorn naouus dre verridigezh eskern ar bizied hag a-wechoù ar c'hreizdorn, ar c'hroc'hen o roufennañ en dro dezho; hefiñv kenan eo eskern ar bizied, ar re-mañ o vezañ hiradus pe verradus ent gouzañvat, an oësoù o hañvalout sankañ a eil re e-barzh ar re all evel elfennoù un teleskop; nammdded a stader e furmoù 'zo a remm henek gant askornloezañ.
- main en trident** ◇ **trident hand** ◇ **dorn tridant** Neuz dorn stadet alies er migornangwe, berr, bouroun ha diskalfet ar bizied anezhañ.
- main figée** ◇ **frozen hand** ◇ **dorn sonnet** Lakadur padek an dorn naouus dre zargrez ar bizied, stardet a eil re ouzh ar re all, an tromaot, an istevn kaherel ha dre strafuilhoù gwazhiedloc'hadel, stadet da heul gloazadoù leiek a 'n dorn pe a 'n arzorn; goude e arzodiñ d'an darfell, e tenner hiziv da c'houlakaat dezhañ arbennoù naouedel kemplezh (damougoù simpatek).

main hypothalamique ◇ ◇ **dorn gouzerc'hvelel** Lakadur an dorn naouus dre blegadur an holl vizied nemet unan, biz yod pe biz kreiz, reut war astenn, stadet da heul anafoù perenneg ar gouzerc'hvel.

main instable ataxique ◇ ◇ **dorn silwink, ankedre g. ar bizied** Koll ar galloud da zerc'hel an daouarn difiñv war astenn pa serrer an daoulagad : tennañ a ra ar bizied da gouezhañ dre wered ar ponnerder, ar gouziviad ouzh o deren bewech d'o lakadur kentañ, test d'ur strafuilh eus an arzeraziñ (Gl. *sens arthrocinétique*, Sz. *arthresthesia*), spesad eus an endoneraeziñ (Gl. *sensibilité interoceptive*, Sz. *interoceptive sensation*) e par ar c'henvelloù (sl. La-09 58).

main succulente ◇ **fleshy hand** ◇ **dorn chugonus** Neuz dibarek an dorn diwar un ensiladur gouliñv er gwiadoù endan-groc'hen, muiek e par ar c'hildorn hag an oeñsoù nezek, kevret alies gant isteñv ar c'higennoù, strafuilh stadet er c'havnvelad, e degouezhioù 'zo ar viopatiezh hag evel arlenad al ledseizi.

main thalamique ◇ **thalamic hand** ◇ **dorn derc'hvelel** Neuz an dorn en azoniad derc'hvelel : plegadur an arzorn war helmo, plegadur ar c'henvelloù kreizdorn-oeñsoù, astennadur ar c'henvelloù etre-oeñsoù, nesadur ar meud, ankedre ar bizied, strafuilhoù gwazhiedloc'hadel (dorn chugonus) ha laurioù grizias krisaet gant ar yenjenn.

mains, pieds, bouche : maladie ou syndrome ~ ◇ **hand-foot and mouth disease** ◇ **kleñved daouarn-treid-geoù** Anaev kuñv, o tarvezout gant ar vugale dreist holl, alies e rezh darreuziadoù bihan, naouus dre ur genaoufo gant c'hwezigennoù o c'houliezañ diouzhtu hag un dispuilhad gougel c'hwezigennoù bihan damlouet war an daouarn hag an treid en dro d'an ivinoù pergen ha war ar seulioù; kiriek dezhañ e ve ur viruz *Coxsackie* a rizh A.

Maisonneuve : fracture de ~ ◇ **Maisonneuve's fracture** ◇ **torr g. Maisonneuve** Torr eus gouzoug ar spilhenn kevret gant un torr eus an ufern kreizel, digoret gantañ ur skarr (*diastaziz*) etre pennoù traoñ ar skin hag ar spilhenn.

mal d'altitude ou des montagnes ◇ **altitude or height sickness** ◇ **droug g. an uhelder pe ar menezioù, uc'h-adell b.** Teskad ar strafuilhoù da heul an tremen buan d'un uhelder bras divoas evit ar bevedeg : gwadisvec'h oksigen o tevoudañ muiadur gwenterezh ar skevent, kalonustead, direizhoù an arc'hwelioù merzhadel ha kefredel o vont betek an ezwal (sl. *aviateurs : mal des* ~).

mal des rayons ou des irradiations pénétrantes ◇ **radiation injury** ◇ **droug ar skinoù pe ar skinaoù trebarzhus** Strafuilhoù gouzavet gant ar glañvourion prederiet dre ar skinoù X pe ar c'horfoù skinoberiek, gwech kentrat, skañv, berbad, heñvel a-walc'h ouzh an droug mor, gwech goulerc'hat, o c'hoarvezout eus un asikted don gant darc'hoal, c'hweladoù, terzhienn, tre-c'hwez, iswask talmerel, e dalc'h daralladoù ar gwad ha deloezadur ar gwiadoù kleñvedek distrujet; gant reuzidi an argadoù derc'hanel pe an darvoudoù en imboure'hvaou atomel, e stader, hervez kreñvder ha padelezh an ardizh, gwech anaezioù nerval marvus raktal pe dindan an nebeut eurvezhioù, gwech erzerc'hadoù koazhadel (c'hweladoù, darc'hoal, terzhienn) o tarvezout e-kerz ar 15 deiz kentañ ha marvus ivez, gwech direizhoù gwadel da heul anafoù ar mel eskern, oc'h anadiñ goude teir sizhun, lod anezho kuradus.

mal du roi, écrouelles, scrofules ◇ **king's evil, scrofula** ◇ **droug ar roue, droug sant Kadou** Anvadoù istorel c'hwarn-ennoù ar gouzoug; meneg ar roue a zave d'ar gredenn e oa brient roueou Frañs pe Saoz parañ an kez droug dre an touch.

mal perforant ◇ **mal perforant** ◇ **droug treloezus** Gouliez dilaur o tennañ da zonaat, e dalc'h un anaf nerval peurliesañ; div furm a zeskriver : an *d. t. genaouel* (Gl. *m. p. buccal*), anaev dibaot, naouus dre gouezh emdarzh an dent, deloezañ ribl al logigioù, treloezadoù ar stavn, dec'honet gant un trigevellfo, e dianlen an tabez alies, hag an *d. t. solel* (Gl. *m. p. plantaire*), gouliez sezet dindan ar c'henvell kreiztroad-oeñsoù, o tennañ da wazhañ ar c'henvell, devoudet gant an tabez, an diabet c'hwek, al liesnervennfo, ar c'havnvelad, al lovrezh.

mal : haut ou grand ~, **mal caduc ou comitial ou sacré** ◇ **morbus comitalis or divinum or sacer** ◇ **droug uhel pe sant Yann** Anvadoù henvoazel an droukfell hollek, ent resis an *droug bras* (Gl. *grand mal*, Sz. *epilepsia major*) (sl. *épilepsie généralisée*).

malabsorption : syndrome de ~ ◇ **malabsorption's syndrome** ◇ **azoniad ar misug** Teskad arouezioù oc'h erzerc'haat un disvezhur grevus a orin koazhadel : darc'hoal druzoulek puilh ha hirbad, treutadur, amwad, negeziou liesel (proteinoù, kalkiom, kaliev, vitaminoù), e dianlen pe ur strafuilh er sugañ pervezel (da heul dazbidañ pe heptreugañ surjaniel ar vouzelenn voan, fic'h kreuz-kolon, druzoul hennadek, kleñved Whipple) pe ur skorted koazhadel dre benn an olenzim (e-kerz kleñvedoù a 'r c'hreiz, a 'n avu pe a 'n ilgreiz).

malacia ◇ **malacia** ◇ **malakia g.** Avez kleñvedek ouzh ar meuzioù brout pe trenk (sl. *appétit, parorexie*).

(-)malacie ◇ (-)malacia ◇ (-)blodad g. Boukadur, sk. : *migornvlodad* (Gl. *chondromalacie*).

malacoplasié, malakoplakie ◇ **malacoplakia** ◇ **malakoplakiezh b.** Anaev dibaot, kuñv, dianav e arbenn, leteñvel ouzh al leukoplakiezh, stadet e par glaourgenn ar c'hwezbigell e rezh plakennoù melen-azgell, blot, balirek, arront, gouliezek a-wechoù; e-barzh an endan-c'hlaourgenn e c'hoarvez un erwez histiokitel gant kelligoù bras eozinofil spoumek enno vakuolennoù hag ebarzhennoù bazofil : korfoù Michaelis ha Gutmann; naouus ent klinikel dre arouezioù c'hwezbigellfo henek; c'hoarvezout a ra da anafoù heñvel tizhout ar forzhioù troazhañ all (sl. *leucoplasié*).

maladie ◇ **disease, ill, illness, sickness** ◇ **kleñved g.** Daralladur stad ar yec'hed erzerc'haet peurliesañ dre azonoù hag arouezioù, savelet e hiniennded nozografek, eleze bet ergorelaet e arbenn, e ardarzh ha digemmet diouzh ar c'hleñvedoù all.

NOTENN : Dre anaev pe *klañvadur* (Gl. *affection*) ez arouezer nep argerzh kleñvedel na lakaer ket e arbennezh e penn kont;

er C'hlinik, e reer *azoniad* (Gl. *syndrome*) eus un argerzh kleñvedel a zo warnañ doareoù an hinienned nemet a chom dianav e arbenn.

maladie acquise ◇ **acquired disease** ◇ **kleñved arzeuat** Kleñved dec'hanez goude ar frouezhig, pe e-kerz an enkrozhvezh (*rizhellnaouedoù* ha *krouellnaouedoù*), pe goude ar c'hanedigezh; termen kevenep da *kleñvedoù hêrezhel* pe *hilel* (sl. *embryopathie, fœtopathie, mala-die congénitale, maladie génétique, maladie héréditaire*).

maladie aortique, valvulopathie aortique ◇ **aortic valvular disease** ◇ **kleñved aortek, trapignaoued g. aortek** Anvad rumm evit anaoù an trapig aortek o kevredin isvoll ha skorted.

maladie congénitale ◇ **congenital disease** ◇ **kleñved ganedigel** Kleñved bezant gant ar bugel d'e c'hanedigezh, a zo pe *hêrezhel*, pe *arzeuat*, dec'hanez e-kerz tri miz kentañ an enkrozhvezh (sl. *congénital, innéité, maladie acquise, maladie génétique, maladie héréditaire*).

maladie émergente ◇ **emerging disease** ◇ **kleñved eskorat** Pore devoudet gant ur gwezher dianav betek neuze (legionelloz, haza) pe dinodet da heul daskemmadur ur gwezher anavezet; nevezed ar c'hleñved ouz e dalc'h parennoù diseurt: kemm danvevad, trezouger, kleñvedusted, skod, dargenad o reiñ d'ur viruz milger'h tredizhusted ouz an denion (grip an evned, empennaouedoù spouevanek), pe c'hoazh, bakteri saprofitek aet da gleñvedus a-gevaraez d'ur gouzivad a'n hangae, (kleñvedoù koulzataer); anv a reer eus *kleñvedoù adeskorat* (Gl. *maladies réémergentes*) azivout poreoù a selled evel ezvoudet (brec'h) pe war steuziañ bennozh d'ar c'houlzadoù vaksinerzh (difteriezh), a-zivout ivez kleñvedoù darreuziadek istorel a weler o tistreiñ dre wall an davantagezh, pe a zoujer na zistrofent evel araezioù sponterezh (bosenn, brec'h, serk).

maladie familiale ◇ **familial disease** ◇ **kleñved familhel** Anaev o wazhañ, hep ma kemm e furn, lies ezel eus ur familh, nad eo ket prouet ez eo *hêrezhel*, ac'hoel er c'hemeradur hiloniel; erzerc'hañ a ra e rezh ur strafuilh en diorreadur ha lakaat a ra e penn kont keal ar *goudrevn* (Gl. *terrain*).

maladie génétique ou génotypique ◇ **genetic disease** ◇ **kleñved hilel** Kleñved diwar un dizurzh hilel, a zasparzher etre 4 stroll : 1) ar *k. h. dre c'houkoevad kromozomel*, eleze dre ezreolderioù c'hoarvezet da geñver ar meioz a-fet niver ha luniad ar c'hromozomou, o tec'han kammneuziadoù ha dilerc'hegezh vred (azoniadoù Turner, Klinefelter, trizomiezh 21), 2) ar *k. h. hêrezhel ungenennel*, treuzkaset er mod mendelek aotozomek trec'hek (kleñved Steinert, korea Huntington), aotozomek enkilek (mukoviskidoz, drepanokitoz) pe reveret (hemofiliezh A), e dalc'h ur c'henenn gleñvedek, 3) ar *k. h. mitokondriel*, treuzkaset dre ar vamm, ereet ouz an DNA ankromozomel (anteñv gweladel Leber, azoniad MELAS), 4) ar *k. h. liesparennel* pe *liesgenennel* (diabet a rizeh 1, mellennarzfotomaotus, kankroù ar vronn hag ar c'holon) (sl. *maladie congénitale, maladie héréditaire, maladie par aberration chromosomique, mitochondriales : maladies* ~).

maladie héréditaire, hérédopathie ◇ **hereditary disease** ◇ **kleñved hêrezhel** Kleñved treuzkaset dre ar spergellig pe ar vigellig, o revout enta adal deroù an enkrozhvezh, kiriek dezho bezañs gen kleñvedek war ar c'hromozomou (devoud ouz o dispartiañ diouz ar c'hleñvedoù familhel all); hervez mod an treuzkas en o renker etre *k. h. aotozomek trec'hek*, *k. h. aotozomek enkilek*, *k. h. reveret*; lavaret e vezont *ganedigel* pa anadont kerkent hag ar c'hanedigezh, pe *anganedigel* pa erzerc'hont er gaezougezh pe en oad gour (sl. *dominant, hérédité autosomique, hérédité liée au sexe, maladie congénitale, maladie familiale, maladie génétique, récessif*).

maladie homologue, syndrome de réaction du greffon contre l'hôte ◇ **graft versus host disease, GVHD** ◇ **azoniad an erwez imboudenn ouzh ostiz** Teskad ar strafuilhoù, marvus alies, o tizhout un hinienn bet derenet d'ar gougemer hangae, da heul ensezadur un imboudenn puilh enni kelligoù hangae'hougonek (mel eskern da skouer), anezho erzerc'hadoù diwar erwez an imboudenn ouzh an ostiz, gwazhet, hep gallout emzifenn, e gelligoù hag e antigenoù gwiaadkempadusted gant limfokit an imboudenn, ent klinikel: treutadur, darc'hoal, dispuilhadoù gant darallad ar faner, poreadoù, avufelc'husvent, isteñv ar organoù limfoidel.

maladie lysosomiale ◇ **lysosomal storage disease** ◇ **kleñved lizozomel** Kleñved hêrezhel, treuzkaset er mod enkilek, diwar zivig un enzym bezant el lizozomou, divig o tec'han ur migennevid a'n danvezennou dispennet ent reol gant an kez enzym ha, dre se, o chom yoc'het en organoù 'zo e devoud ur c'hleñved kroniadel (Gl. *maladie de surcharge*) (sl. *thésaurismose*).

maladie médicamenteuse ◇ **drug disease** ◇ **kleñved liael, liaegezh b.** Strafuilhoù devoudet gant danvezennou arveret er yac'hadurezh, pe da heul ur c'hemeradur doenadoù reñverek, pe dre benn erwezhoù angougemer, pe c'hoazh en askont da wiveredoù e par organoù nad int ket ar re ma sez ar c'hleñved a venner prederiañ.

maladie métabolique ◇ **metabolic disease** ◇ **kleñved kennevidel** Anvad rumm ar c'hleñvedoù a-geñver gant un dizurzh er c'hennevid, hêrezhel pe arzeuat, dianlen da ezvezañs un enzym en ur widenn enaozañ, d'un ezreolder enborc'hadel pe d'un digempouez mezhuere; o strafuilhañ kevrentelioù ar glukid (diabet, glikogenoz, gwadc'halaktozegezh), an nukleotidoù (urlou), ar protid (amindrenkennaezioù) pe an arwastadezioù trenken-bazenn, ionel, fosfor-kalkiom, vitaminel (sl. *équilibre*).

maladie mitrale ◇ **mitralvalvulopathy** ◇ **kleñved mintrek, trapignaoued g. mintrek** Anvad rumm evit anaoù an trapig mintrek o kevredin isvoll ha skorted a orin remmel.

maladie moléculaire ◇ **molecular disease** ◇ **kleñved molekulel** Kleñved diwar un namm genezhel ha hêrezhel o herzel a enaozañ ur stroll molekulel anenzimatek, sk. : an *hemoglobinozioù* ma par ar gouziviad un hemoglobin kleñvedek (S, C pe all) e-lec'h an hemoglobin bonan; hiziv e tenner da renkañ e-touez ar *k. m.* an anaevioù diwar ezreolderioù an enzimoù hag an antikorfoù ha zoken kleñvedoù arzeuat (leukemiezhoù 'zo ma kaver hemoglobinoù hag enzimoù ezreol) (sl. *héoglobinopathie*).

maladie par aberration chromosomique ◇ **chromosomal aberration disease** ◇ **kleñved diwar gouskoevad kromozomel** Kleñved ganedig e dianlen un ezreolder niver pe luniad (dileañ, azdoublañ, ginrannañ, treuzloañ) ar c'homozomou somatek (gouskoevad aotozomek) pe revel (gouskoevad gonozomek); darvezout a ra an ezreolder da geñver ar meioz ha de-c'han pe ur reñver dafar kromozomel (trizomiezh) pe un diouer (monozomiezh, dilead ur vrec'h kromozom); ar gouskoevad ned eo ket treuzkasadus, lakaet er-maez degouezhioù dibaot a dreuzloadur (sl. *aberra-tion chromosomique, caryotype, délétion, dysgonosomie, monosomie, poly-gonosomie, sexe nucléaire, trisomie, translocation*).

maladie professionnelle ◇ **occupational disease** ◇ **kleñved micherel** Kleñved devoudet gant oberoù pe amveziadoù ar vicher; kiriek d'ar *k. m.* e vez gwezherioù fizikel (skinanafoù, kleñved ar c'haelogoù) pe gimiek (darouedenn ar givjerion, kravien ar simanterion), ar pistrienoù (plomegezh, benzenegezh, sulfhidregezh an divlezerion), an hadennoù kleñvedus (burbuenn yud, enkorad diskejañ); e pep riez e vez savelet un dezvadur gwardevzegezh resis a-zivout an angemer hag an dic'haouiñ a 'r c'hleñvedoù micherel (sl. *accident du travail*).

maladie résiduelle ou résiduelle minimale ◇ ◇ **kleñved dilerc'h izek** Trebad eus kelligoù hanweek dibaot gant ur c'hankreg bet prederiet dre ar surjianerezh, ar c'himi- pe ar skingurañ; outo e vez arnodet an hangaegurañ oberiat (sl. *immunothérapie*).

maladie rythmique atriale, syndrome bradycardie-tachycardie ◇ **bradycardia-tachycardia syndrome** ◇ **kleñved korvezel ar c'hentez, azoniad an istead-ustead** Aneaz o tizhout hiniennoù ouzhpenn 50 vloaz a oa doare yac'h gant o c'halon betek neuze, naouus dre ur pebeilad barradoù ustead hag istead uskofig o tarvezout alies pe aliesoc'h, kevret gant rastrid, tre-c'hwez, vaganadoù, erzerc'hat da zireizhoù diseurt a 'r gorvez : ustead dre grehad, gougren pe sistolustead kentezel; godistead dre dolc'had god-kentez pe kentez-kofig; dirak daskended ar gwikefreoù angorzhet e vez enneget yac'h hadurioù niverus ha kevenep, ar re liesañ o vezañ al liaoù enepmigorvez kevredet gant desezad un adalf (sl. *sinus : maladie du ~*).

sixième maladie, roséole infantile ◇ **sixth disease** ◇ **c'hwec'hvet kleñved, rozig g. mabanel** Terzhienn dispuilhadel kuñv, o tarvezout gant ar vugale etre 6 miz ha 2 vloaz, naouus dre un derzhienn uhel (etre 39° ha 40°C), un diwresterad trumm d'an 3^e pe 4^e deiz, e ser un dispuilhad ruzigvanek roz sklaer, hebiat d'an dremm, e-doug 24 h, un isriñv leukokit ha granulokit; kiriek dezhi an *Herpesvirus6* (bet dizoloet e 1986).

maladie systémique ◇ **systemic disease** ◇ **kleñved reizhiad, kleñved sistemel** Deavad arzaeladus pa venne da gentañ arouezñ kleñvedoù o tizhout ent hanbarek holl elfennoù ur reizhiad (reizhiad retikuloendotelel, reizhiad limfoidel, gwiaed kenglenel); en devoud, ez erdal un teskad anaезioù daskevarall (lavaret a-wechoù *foel anspeadel*) n'eus a voutin kenetrezo nemet demerded o arbennelezh : lupuz eritematus lemm strewek, kleñvedoù ar c'henvelloù (liesarzfo henek yaouerel, kleñved Still an oadourion), ar c'hroc'hen (skleroderma, dermatomiozit, azoniad Shulman, azoniad Gougerot-Sjögren), ar gwazhied (gwazhiedfo allergek), kleñved Behçet, kleñved mareadek.

malaise

• *malaise fonctionnel* diaezad arc'hwelel • *malaise général* diaez hollek • *ensemble des malaises éprouvés* teskad an diaezoù merzhet • *malaise vagal* diaezad dispizel.

malentendant, hypoacusique ◇ **partially deaf** ◇ **isklevlek aa.** Leiaet e lemmded klevout (sl. *hyoacusie*).

NOTENN : Amañ eo paot ar c'hevatalioù e brezhoneg kaozeek : *ponnerglev, teñvalglev, uhelglev*, h.a. ; paot ivez ar barrezghioù o tont eus ar yezh kent : *bouzarik, bouzaregennek, bouzaran* (hBr. *bodaran*), hep kontañ kevatal ar galleg dic'harvadek arnevez (1960) *malentendant : fallglevat* (sl. La-18 215).

malformation ◇ **malformation** ◇ **kammneuziad b.** Ezreolder en ur parzh eus ar c'horf o revout d'ar c'hanedigezh, kiriek dezhañ ur strafuilh a 'n diorren darvezet e-kerz an enkrozhevzh; e kemm ouzh an *disneuziadur* amparet goude ar c'hanedigezh, ez eo ar *k.* ganedig dre zespizadur, ha hi pe *hêrezhel* (pe *hilel*), pe *arzeuat* da heul ur rizehllaoued pe ur c'hrouellaoued (sl. *embryopathie, fœtopathie, maladie acquise, maladie congénitale, maladie génétique, maladie héréditaire*).

malformation luxante de la hanche ◇ ◇ **kammneuziad disvellus al lez** Termen kinniget gant Lance evel kevazasoc'h da erlec'hiañ ouzh *disvellad ganedig al lez*, hemañ o tisoc'h en devoud eus destrizhoù treloc'hel *in utero*, o tisvoutañ penn an askorn morzhed e-maez ar bodenn; an arbenn liesañ eo durc'hadur revrel diglok ar grouell da geñver ur vrazzedd kentañ; un arbenn all eo laoskegezh hêrezhel ar stagelloù (sl. *ressaut : signe du ~*).

malformat-

• *bandelette fibreuse d'origine malformative* lurell stirek kammneuziad • *broncho-pneumopathie malformative* bronkezskeventad dre gammneuziañ • *parties génitales atteintes de malformation* parzhioù ganadel kammneuziet • *phénomène malformatif* kammneuziañ • *repli cutané malformatif* aspleg kroc'hen kammneuziad • *syndrome malformatif* azoniad kammneuziad • *tumeur vasculaire malformative* yoc'henn wazhiedel kammneuziad.

Malgaigne : fracture de ~ ◇ **Malgaigne's fracture** ◇ **torr g. Malgaigne** Torr daouek diazerc'h gouriz an ezel traoñ, al linenn dorr arak o tremen dre an toull steviet, al linenn dorr adreñv dre askorn al lez.

Malgaigne : ligne de ~ ◇ **Malgaigne's line** ◇ **linenn b. Malgaigne** Linenn o vont eus ar spernenn glun arak uhelañ da dorzhell ar c'haezour ageñver gant stagell ar varlenn, merk disparti etre an avelennoù a-vorzhed a-is hag an avelennoù a-varlenn a-us.

malignité ◇ **malignancy** ◇ **yuter g.** Doare manguñv ha monedigezh arialek ur c'hleñved, naouus dre ziflukadur azonou disreol grevus ouzh grevus hag un dedro andistrec'h d'ar marv; termen arveret ivez a-zivout ur yoc'henn, feudek dre he aloubusted hag he zued da hollekaat.

malin (b. : -igne), **pernicieux** ◇ **malignant**, **pernicious** ◇ **yud aa.**, **arialek aa.** A-zivout ur c'hleñved manguñv, o tedeññ ent emdarzh d'ar marv.

NOTENN : I— Aozerion c'hallek a ra anv eus *sympôtomes anormaux* pa gomzont eus ar c'hleñvedoù yud, evit arbouezañ an anreizhiadek eo an azonoù anezho ; gwel e kredan kinnig un adanv all : tra ma verk *ezreol* ur skarad e-keñver ar reolded, en eneb e verk *disreol* an andave da nep reolded, an antevn. .

NOTENN : II— El lizheradur gallek e talvez *malin* ha *pernicieux* da zec'heriañ an un keal (skouerioù etre re all : *tumeur maligne, anémie pernicieuse*) ; diouzh o zu ez arver an aozerion saoznek *malignant* ha *pernicious* e degouezhioù dibarek, da skouer pa reont eus ar *malignant anaemia* ur spesad eus ar *pernicious anaemia* — arlivioù deberzhak a ve dizeur enporzhiañ e brezhoneg. Kinnig a ran ober gant Br. *yud* evel kedrann anvad (sk. : *an amwad yud*), gant Br. *arialek* evit merkañ derez ar c'hrevusted (sk. *ur pore arialek*).

malin : **syndrome** ~ ◇ ◇ **azoniad yud** Teskad azonou en ervez da rouestlañ ar poreoù (diferiezh, skarlegenn, ruzell, grip, tifoid, h.a.), oc'h anadiñ kentrat pe diwezhat : angramm, uswrez, koempad kalongwazhiedel, c'hweladoù, darc'hoal, troazhproteinegezh, gwadliñvoù hag eritemoù, anezhañ un azoniad diwar tizhad ar reizhiad nervstruzhel, arialek hag o tedeññ d'ar marv.

malin : **syndrome** ~ **des neuroleptiques** ◇ ◇ **azoniad yud an nervisreerioù** Anaev dibaot, grevus, en ervez da zarvezout e-kerz ar prederiadur dre an nervisreerioù enepssikoz, o kevredañ uswrez, anfiñv, migenskiant, c'hwezennoù puilhek, ustead-migorvez, halvusvorc'h, reuter a'r c'higennoù hag arouezioù bevoniel rabdomioliz ; gwellaet eo bet an erbedad krai (e-tro 25 % marvusted) gant degasadenn ar mezegadurioù darlaoskus.

malleole ◇ **malleolus** ◇ **ufern** g. Pep hini eus an daou valir oc'h amparañ ar c'henvell etre ar c'har hag an troad, anezho an *ufern kostezel* (TA *malleolus lateralis*), ouzh e ober penn traoñ ar spilhenn hag an *ufern kreizel* (TA *malleolus medialis*), baleg en astenn da dalbenn diabarzh e penn traoñ ar skin (sl. *cheville*).

Mallory-Weiss : **syndrome de** ~ ◇ **Mallory-Weiss syndrome** ◇ **azoniad Mallory-Weiss** Gwadliñvoù kreuzpervezel, marvhus alies, e dianfen gouliezadur glaourgenn ar gwask krec'h, da heul c'hweladoù arreat war hir amzer, rouestlad d'an alkool-egezh henek, d'ar c'hreuzfo isteñvus, d'ar c'hirrozioù mezhurienn, h.a.

malnutrition ◇ **malnutrition** ◇ **mivagañ, mivag** g. Termen hollek oc'h aroueziañ nep ezreolder er magañ, dre reñver, diouer pe digempouez (sl. *athrepsie, carence, inanition, dénutrition*).

NOTENN : Kemm a lakaer etre diarsell an *enankañ*, eleze ar vouetadurezh, doareoù ar boued kemeret gant ar bevedeg, ha diarsell an *danveziñ*, eleze ar c'hennevid, tonkad ar boued ur wech euvret ; kemm hemañ na vez ket sklaer bepred e hanc'herieg ar yezhoù all (Gl. *alimentation, nutrition, Sz. feeding, alimentation, nutrition, Al. Fütterung, Nahrung, Ernährung*) ; kinniget eo bet fraeshaat an hanc'herieg vrezhonek dre zeverañ diwar -*mag-* an termenou o sellout ouzh an enankañ, diwar -*mezhur-* an termenou o sellout ouzh an danveziñ (sl. La-16 163-165).

malocclusion dentaire ◇ **dental malocclusion** ◇ **migeharz** g. **an dent** Kenempradur ezreol an dent traoñ gant an dent krec'h (sl. *Angle : classification d'~*).

malonylurée, acide barbiturique ◇ **malonylurea, barbituric acid** ◇ **malonilurea** g., **trenkenn b. varbiturek** Trenkenn o tisoc'h eus kediadur an drenkenn valonek hag an urea a zo deveret diouti ar barbitureier.

Malpighi : **pyramides de** ~, TA **pyramides renales** ◇ **renal pyramids** ◇ **pikernennoù** l. (b.) **al lounezh** Isrannoù mezonenn al lounezh, dezho un diaz diavaez is-kaennenn, ur genn diabarzh, anezhi ar vegenn, o valirañ e-barzh oaled ur c'halir bihan, hag ul luniad rizennek dre benn d'ar pibelloù eeun.

malposition

- *la dystopie est la malposition d'un organe* kammloadur un organ eo ar milec'h • *malposition dentaire* kammloadur an dent
- *malposition (situation anormale) des grands vaisseaux* kammloadur ar gwazhied bre.

MALT ◇ **MALT** ◇ **MALT** (Gwreskanv diwar Sz. *mucosa-associated lymphoid tissue*), gwiad limfoidel dibarek o revout e-barzh ar glaourgennoù (sl. *Peyer : plaques de* ~), en ervez da vezañ sez limfomou B pe T koazhadel pe bronkez.

malt ◇ **malt** ◇ **malt** g. Heiz eginet, sec'het ha digellidet, danvezet da oberiañ bier pe wiski.

maltase ◇ **maltase** ◇ **maltaz** g. Enzim halvel pe pervezel o tourrannañ ar maltoz e glukoz, diouerek e glikogenozioù 'zo (sl. *glycogénique : maladie ~, Pompe : maladie de* ~).

maltose ◇ **maltose** ◇ **maltoz** g. Diholozid direer daou volekul glukoz ouzh e ober, sukr ar malt, parzhiat er glikogen hag en ampez.

maltosurie ◇ **maltosuria** ◇ **troazhvaltozegezh** b. Bezañs maltoz en troazh.

malvoyance ◇ **low vision** ◇ **iswel** g. Leiadur al lemmded weled (sl. *achromatopsie, amblyopie, amaurose, anopsie, cécité, hémianopsie*)

1 malvoyant 2 personne malvoyante ◇ **1 with low vision 2 person with low vision** ◇ **1 iswelek aa. 2 iswel-eg** g. -eion 1 Gant leiadur al lemmded weled. 2 Den iswelek ; hervez rummadur Aozadur Bed ar Yec'hed, e tisklerier iswelek un den a zo lemmded weled e lagad gwellañ, goude dereizhañ, etre 1/20 ha 3/10 evit un ergorenn lec'hiet 5 m dirazañ (sl. *cécité pratique*).

mamelle, TA *mamma* ◇ **breast** ◇ **bronn** b. (d. : **divronn**) Organ daoudañvat boulllek loet e lodenn grec'h-araok ar brusk, o tont ec'honekoc'h gant ar vaouez d'ar gaezouegezh, ouzh e ober ar wagrenn vronn ha gwiad behinel.

mamelon, TA *papilla mammae* ◇ **nipple** ◇ **beg** g. ar **vronn** Eizhaenn gernennek ar vronn, lec'h ma tifourk ar sanioù laezhkaser, en dro dezhi un tachad kelc'hiek ha livegat, ar rodenn.

mamiloplastie ◇ **mammiloplasty** ◇ **begbronnatelviñ** Dazbidañ un pe div zrailhenn grec'hen en dro d'ar beg bronn war-benn diren un ampukad anezhañ.

mmaire : **glande** ~ ◇ **mammary gland** ◇ **gwagrenn ar vronn** Gwagrenn ezvorc'hañ loet e-barzh ar vronn, o parañ al laezh (sl. *prolactine*).

mammotrope ◇ **mammotropic** ◇ **bronngerc'h** O lenañ ent hanbarek ouzh ar vronn.

Manchester : **opération de** ~ ◇ **Manchester operation** ◇ **gwezhiadenn** b. **Manchester** Kalvezder kenradet gant surjianed-benevourion skol Manchester amkanet da zereizhañ izadoù ar grozh dre hent ar gouin, anezhañ dazbidañ ar gouzoug ha krafaelañ al lezgozoug hag ar pleg youlc'h-krozh ouzh an talbenn araok eus strizh ar grozh.

manchon ◇ **coupling sleeve** ◇ **moñskenn** g. Trevnad gwareziñ stallet etre moñsenn an ezel traoñ ha kraou an osod.

Mandel : **technique de** ~ ◇ ◇ **kalvezder** g. **Mandel** Muzul an amzer ret da zistro ar gorvez godel goude un tredanfraouat herrek (120-150/s) arloet e-doug 30-60 s dre araez ur sont dodet er c'hentez dehou e kefin ar god ; hiroc'h eo ar pad etre dibenn ar fraouadenn ha distro korvez piaouel ar god pa vez darallet hemañ.

mandibulaire : **nerf** ~, TA *nervus mandibularis* ◇ **mandibular nerve** ◇ **nervenn ar c'haved** Barr dibenn an nervenn drigevell, nervenn santout ha loc'hañ evit ar chaokat.

mandibule, TA *mandibula* ◇ **mandibula** ◇ **gaved** b. Askorn an aven draoñ, undañvat, kemparzh, ouzh e ober ur c'horf kromm argevek war dreñv, enstuded an dent war ar ribl krec'h anezhañ, ha daou varr kenvellet gant an eskern ividig.

mandrin ◇ **stylet**, **mandrin** ◇ **ibilan** g. Garenn vetal lem-laka a sanker e-barzh un nadoz kleuz evit steviañ he oaled, en ur sont evit kevaraezañ e reuter (sl. *trocart*).

manducation ◇ **manducation** ◇ **debriñ**, **debradur** g. Teskad an arc'hwelioù genaouel o tiaraogiñ ar c'hoaz-hañ : gavaelañ, chaokat, tañva, enhalviñ, lonkañ.

manganique ◇ **manganic** ◇ **manganek** aa. A-zave d'ar manganek.

manganisme ◇ **manganism** ◇ **manganegzh** b. Pistriadur gant ar manganek o tizhout ar vicherourion a eztenn hag a arwerc'h ar c'hailh anezhañ, erzerc'hat dre un analeuflegezh lemm ha darvoudoù nervredel : darwantusted, asikted, ankewant, krenerzh ha kaherustant o tec'han strafuilhoù er c'hempouez, er c'herzhed, er c'homz, er meidiñ (enebrezh sonnet).

manichéisme délirant ◇ **delirious manichaeism** ◇ **manikegezh** b. **ambreel** Paranoia naouus dre an dergoaliñ bevañ e kreiz ar c'henstourm etre galloudoù galen ha galloudoù gwaredour.

manique ◇ **maniacal** ◇ **1 maniak** aa. **2 maniak** g. **-ed maniakel** aa. 1 Gant ar mania. 2 Gouziviad ar mania. 3 A-zave d'ar mania.

manie ◇ **mania** ◇ **mania** g. Psikoz naouus dre ar vroudedigezh vredloc'hadel, derec'havidigezh an noa gant gourboz hag anc'hrez (Gl. *exaltation psychique*), diflip an dezevou ha froudareizhañ, kefroù hag, en darempredoù, eztridusted (Gl. *expansivité*), emzalc'hioù disgougel, diskorataer ha filenus ; dedreiñ a ra ar c'hleñved dre lankadoù hir pe hiroc'h, a bep eil gant prantadoù reolded pe reuziadoù gouvid melankolek — oc'h amparañ neuze ar psikoz maniakel-gouvidel, furm eizhañ an daouvinegezh (Gl. *bipolarité*) (sl. agitation, cyclothymie, dépression, dysthymie, euphorie, excitation, exhibitionnisme, idées : fuite des ~, humeur 2, *hyperthymie*¹, *hypomanie*, *hypothymie*¹, *logorrhée*, *mélancolie*).

manie atypique ◇ **atypical mania** ◇ **mania anrzhiek** Stad klinikel o kevredañ azonoù mania ha skizofreniezh, a vez mod deroù ur skizofreniezh gant ur c'hrennard, pe ur skoulad mania gant ur skizofren.

(-)**manie**, **-mane**, **-maniaque**

- *-mane* -gaezhiat, -gaezhiad ; -variati, -variad ; -vreat, -vread • *-maniaque* -gaezhel ; varel ; -vreel • *-manie* -gaezh, -gaezhiadezh ; -var ; -vre, -vreadezh • *alcooolomanie* alkoolaroc'h • *algomanie* laurvar • *arithmomanie* riñvvar • *clastomanie* brevvar
- *clinomanie* gourvezvar • *cocainomanie* kokaingaezh, kokaingaezhiadezh • *codéino-manie*, kodeingaezh, kodeingaezhiadezh
- *démonomanie* demonvreadezh • *dipso-manie* mezvar • *érotomanie* serc'hvreadezh • *éthéromanie* eterestoue • *graphomanie* skrivvar • *hédonomanie* blizvar • *héroïnomanie* heroingaezh, heroingaezhiadezh • *hypomanie* gouvania • *kleptomanie* laervar
- *manie blasphematoire* kaoc'heuriañ, kaoc'heuriadezh • *manie lectuaire* gourvezvar • *mégalomanie* meurvreadezh • *mythomanie* gaouvar • *pharmacomanie* liagaezh, liagaezhiadezh • *potomanie* diedvar • *sitomanie* bouedvar • *toxicomane* drammgaezhiad, kaezhiad • *toxicomanie* drammgaezh, drammgaezhiadezh, kaezhiadezh (sl. La-07 88-90).

maniérisme ◇ **mannerism** ◇ **orbidegezh** b. Doare ardaouek, brizheun, dezerc'hadek an emzerc'hel, ar realañ hag an eztaoliñ (prezeg, meidiñ), tres neuzid hep mui peurliesañ, a-wechoù azon ur bredanaez (darfell, skizofreniezh) (sl. La-18 216-217).

manifest-

- *comparaison du récit manifeste du rêve avec son contenu latent* keñveriañ danevell diskelat an hunvre ouzh he endalc'hed enkelat
- *douleur violente manifestant (traduisant, indiquant, révélant) un début de péritonite* laur taer oc'h erzerc'haat deroù un ampelenno
- *hémopathie maligne se manifestant par de nombreuses tumeurs* gwadnaoued yud erzerc'hat dre yoc'hennou

niverus • *maladie métabolique se manifestant (se traduisant) par des malformations* kleñved kennevidel oc'h erzerc'hañ dre gammneuziadoù • *manifestations cutanées de l'allergie* erzerc'hadoù kroc'hen an allergiezh • *tendance du caractère se manifestant par des compor-tements hostiles* doug a 'n neuzid o tont erzerc'h dre realoù galen.

manipulation ◇ **manipulation** ◇ **1 dornata 2 dazverañ 3 darfiñval** 1 Embreger danvezennoù gant an daouarn war eun pe dre areaz binvioù, sk. : *dornata aozadoù apotikel*. 2 Ren gwezhoù war elfennoù arbennik evel ar gen, ar molekul, sk. : *dazverañ hilourel* (sl. *génétique : manipulation* ~). 3 Gerienn en arver gant al leuñvourion da arouezñ an *defiñval helc'hat* (Gl. *mobilisation forcée*) (sl. *mobilisation articulaire*, La-18 228-229).

mannitol ◇ **mannitol** ◇ **mannitol** g. Alkool deveret eus ar mannoz, arveret dre hent engwazhiennel evit studiañ an dizeul lounezhel, dewerc'hañ un troazhusvorc'h grennel pe diren gouliñv an empenn (sl. *clairance rénale, diurèse osmotique*).

mannose ◇ **mannose** ◇ **mannoz** g. Heksoz bezant er stad natur e-barzh struzhennoù diseurt.

mannosidose ◇ **mannosidosis** ◇ **mannozidoz** g. Kleñved kennevidel hêrezhel dibaot eus stroll ar mukolipidozioù o tizhout ar vugale, naouus *ent klinikel* dre ur miziorre a 'n eskern, un dilerc'h bredloc'hadel, un avufelc'husvent hag ar vezañs eus kediadoù ar mannoz en troazh, el leukokit hag e kelligoù an avu hag ar felc'h, *ent vevoniel* dre ziouer un enzym, an *α-mannozidaz* (sl. *mucolipidose*).

manœuvre ◇ **maneuver** ◇ **1 embreg g., embregad g. 2 kefleuñvad g.** 1 (Ster ledan) gwezhiad renet gant ar c'horf, gant an daouarn pergen, war un amkan lavaret. 2 (Ster mezege) arezad klinikel, surjaniel pe amiegel amkanet d'ober kemmañ lakadur d'ur gouziviad, d'ur parzh korf pe d'ur grouell, evit ren un imbourc'h, ur prederiadur pe ur gwilioud.

manœuvre

• *manœuvre de l'accroupissement* embreg ar puchañ • *manœuvre destinée à augmen-ter la flexion du fœtus in utero* kefleuñvad evit muiaat plegadur ar grouell er grozh • *manœuvre destinée à éviter la mort par asphyxie lors de l'obstruction du larynx* kefleuñvad amkanet da barraat ouzh ar mogañ marvus diwar stankadur ar c'harloc'henn • *manœuvre destinée à objectiver un discret déficit moteur* embregad evit lakaat war wel un divigad loc'hadel diheverzh • *manœuvre destinée à mettre en évidence une raideur méningée* kefleuñvad evit lakaat war wel ar reuted a bilhon • *manœuvres externes en obstétrique* kefleuñvadoù diavaez er gwilioud-erezh.

manométrie ◇ **manometry** ◇ **gwaskventerezh** g. Muzul ar gwask e diabarzh ur wazhiedenn pe ur gavenn.

manuluve ◇ **handbath** ◇ **leuñvolc'hiñ, leuñvolc'h** g. Soubañ an daouarn.

MAPA (monitorage ambulatoire de la pression artérielle), Holter tensionnel ◇ **ABPM (ambulatory blood pressure monitoring)** ◇ **gouarnerezh g. baleadel gwask ar gwad, GBGG** Kalvezder evezhierz gwask ar gwad dre hent muzuli-adennoù arreet graet er-maez eus ar metoù mezege, ospitalel pergen, war ur gouziviad dezaset warnañ un trevnad gwaskventer lerc'hwezer (sl. *blouse blanche : effet* ~).

MAPAD (maison d'accueil pour personnes âgées dépendantes) ◇ ◇ **kendouesti an henaded amzalc'hiat, KHA** Rumm botioù arbennikaet ha mezegelaet kenradet er bloavezhioù 1980.

marasme ◇ **marasmus** ◇ **angrinez** g. Treuted eizhañ a 'r c'horf a-bezh da heul ur c'hleñved hir; *angrinez kozhiadel* a reer eus an argerzh disteñv o wazhañ an holl wiadoù er gozhni (sl. *cachexie, hypotrophie*).

marastique ◇ **marantic** ◇ **1 angrinezel aa. 2 angrinezus aa.** 1 A-zave d'an angrinez. 2 O tevoudañ an angrinez, sk. : *tromboz angrinezus* (Gl. *thrombose m.*) tromboz gwazhiennel, o tarvezout e-kerz kleñvedoù o tarallañ don ar stad hollek (kankroù, poreoù, h.a.).

Marburg : syndrome de ~ ◇ **Marburg's syndrome** ◇ **azoniad Marburg** Seurtad skleroz strewek diwar un divielinaat lemm o tedreiñ herrek d'ar marv.

Marburg : triade de ~ ◇ **Marburg triade** ◇ **triad g. Marburg** Stroll tri azon oc'h ober gousellout ur skleroz strewek : arouezioù hegadur pikermenek, steuz an damougoù kroc'hen kofel, disliv parzh ividig an div luc'hsae.

marche ◇ **walk, walking** ◇ **kerzhout, kerzh g., kerzhed g.** Doare dilec'hiañ war droad, an hinienn en he sav o venel dizehan a-stok ouzh al leur hag o kas war raok an eil ezel traoñ war-lerc'h egile; hervez kenfiñv an izili krec'h ha traoñ e tiforc'her ar *c'herzhout pebeiladek* (Gl. *marche alternée* pe *alternante*) pa araka an hinienn war un dro ur c'har hag ur vrec'h a-eiltu hag ar *c'herzhout d'an inkane* pe an *hinkaneal* pa araka war un dro ur c'har hag ur vrec'h a-gendu (sl. *abasia, démarche, dysbasie*).

Marchiafava-Bignami : maladie ou syndrome de ~ ◇ **Marchiafava-Bignami syndrome** ◇ **azoniad Marchiafava-Bignami** Seurtad empennaoued alkoolael naouus *ent neuziadurel* dre varvanned ahelel ar c'horf karnek, *ent klinikel* dre ur morgud argreskus gant arluz hag alfo, direizhoù a 'n tant kaherel, seizioù lagadel hag un dedro herrek d'ar marv.

Marchiafava-Micheli : maladie de ~ ◇ **Marchiafava-Micheli's disease** ◇ **kleñved Marchiafava-Micheli** Furm amwad loezadel arzeuat henek grevus, naouus dre ur gouikter hag un droazhemoglobinegezh grezvarrek nozel; dre an imbourc'h skinizotopel e stader e revez, e-kichen an hemati reol, ur c'hread (klon) leukokit, pladanoù ha hemati kleñvedek berrhoali e diouer antigenoù koc'hennel; o tedreiñ dre frapadoù e-doug bloavezhioù, erzerc'hat dre waskadoù laur kof, trombozioù gwazhiennel (azoniad Budd-Chiari), poreadoù garv; darvezout a ra ar marv da heul un angwe a 'r mel pe ul leukemiezh lemm mieloblastel (sl. *Budd-Chiari : syndrome de ~*).

Marey : lois de ~ ◇ **Marey's laws** ◇ **savelennoù** l. (b.) **Marey** 1°) *Savelenn argemmañ trovezhiek broudadusted ar galon* : anvroudus e vez ar c'haheer kalon el lankad sistolel ha broudadus el lankad diastolel; 2°) *savelenn unvanded labour ar galon* : muiaat a ra talm ar galon pa leia gwask ar gwad, ha leiaat pa vuia ar gwask.

Marfan : **maladie de** ~ ◇ **Marfan's disease** ◇ **kleñved Marfan** Treuzseizi dasstrizhek e dalc'h ar sifiliz ganedigel o tizhout ar vugale etre 4 ha 12 vloaz, kevret gant strafuilhoù bred, kornaefo entremezel hag arouez Argyll-Robertson (mabisvoll, steuz damoug ar mab lagad ouzh al luc'h ha reolded an damoug ouzh an argeidañ).

Marfan : **procédé** ou **voie de** ~ ◇ **Marfan's method** ◇ **hentenn Marfan** Kalvezder ezwanañ an amgalonenn dre an hent argreuzel, anezhañ sankañ an nadoz dindan al lech, war grec'h, a-rez talbenn adreñv ar glerenn.

Marfan : **syndrome de** ~ ◇ **Marfan's syndrome** ◇ **azoniad Marfan** Kleñved hêrezhel ar gwiad kenglenel, treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, naouus dre gammneuziadoù liesel : eskernel (savder bras, treuzrakwar, bruski trezeriek pe evnek, falc'hegezh, laoskegezh ar stagelloù), lagadel (gouzisevellad daoudu hag ezreolded ment ha furn ar ferennoù, kren ar ganevedenn, dedro etrezek diflosk al luc'hsae hag ar glaokom) hag, ar re c'hrevusañ, kalongwazhiedel : gwazhad an aortenn dre ezvezañs gwiennoù dastennek ar grennsae (darvoll god an aortenn, darvoll diskejus), skortek aortek ha mintrek, anafoù kef ar skevent ha kammneuziadoù kalon all.

Marfan : **syndrome malin secondaire de** ~ ◇ ◇ **azoniad yud eilvedel Marfan** Taolenn glinikel grevus o tarvezout e-kerz souzvezh ur gorank difterek (etre ar 5t hag an 20t deiz), anezhi gwelved, asikted, seizi a 'r ouel stavn, koempad kalongwazhiedel, usvent a 'n avu, troazhproteinegezh ha gwadusvec'h urea, dedro d'ar marv dindan un dek devezh.

margination ◇ **margination** ◇ **arlezañ, arlezadur** g. Pegañ al leukokit ouzh speur ar gwazhied da geñver gorrekadur ar red gwad, anadenn diaraogus hag aesaas d'an tregenk.

marginoplastie ◇ **marginoplasty** ◇ **riblatelviñ** Gwezhiadenn dazluniañ amkanet da zereizhañ un entropion kleizennel eus ar valvenn draoù dre izelaat enstedudur ar malgud (sl. *bléfaroplastie*).

Marie et Foix : **manœuvre de Pierre** ~ ◇ **Marie-Foix maneuver** ◇ **embreg g. Marie-Foix** Embreg amkanet da anataat seizi an dremm gant ul ledseizieg er c'homa; ar pouezañ war nervenn an dremm a-dreñv balegoù ar chagell ne laka kigennoù an dremm da argrezañ nemet en tu bonan.

Marie et Foix : **syndrome de Pierre** ~ ◇ **Marie-Foix syndrome, lateral-pontine syndrome** ◇ **azoniad Marie-Foix, azoniad kostezpontel** Azoniad dastuac oc'h erzerc'haat un anaf loet e lodenn gostezel ar pont, o kevredañ un aneraez a 'n dremm hag un azoniad ilpennel a-gendu, ul ledseizi a-eiltu, ul lediseraz distrollat a rizh kavneladel.

marijuana ◇ **marijuana** ◇ **maric'huana** g. Angevezh diwar vleinenoù *Cannabis sativa* sec'het.

Marinesco-Sjögren : **syndrome de** ~ ◇ **Marinesco-Sjögren's syndrome** ◇ **azoniad Marinesco-Sjögren** Kleñved familhel o kevredañ ferennlug ganedigel daoudu, bredizilled, ankedre, treuzkaset er mod aotozomek enkilek; renket betek gouzout e stroll an dic'henezhadurioù livenn-ilpenn a-hêrezh.

Marion : **opérations de** — ◇ **Marion's operations** ◇ **gwezhiadennoù Marion** 1°) Araezad erougrañ disgwered ar c'hwezhiagell, anezhañ amparañ ur c'han troazh nevez dre dunnelaat ar gwiadoù endan-gaezour ha dazluniañ kavenn ar c'hwezhiagell dre grafaelañ houmañ ouzh faskienn kigennoù eeun ar c'hof; 2°) amzivenañ ur bogod eus ar c'hwezhiagell dre hent ar gaezourenn; 3°) amparañ ur c'han troazh nevez goude peurglozañ ar c'hwezhiagell; gwezhiadenn renet pa vez ur fic'h c'hwezhiagell-gouin ha distruj gouzoug ar c'hwezhiagell; 4°) dlita ar c'hleuz youlc'h-krozh dre grafaelañ talbenn araok ar youlc'h ouzh talbenn adreñv ar gouin ha gouzoug ar grozh : gwezhiadenn amkanet da barraat ouzh dreklepad ha drekwariad ar grozh.

Marjolin : **ulcère de** ◇ **Marjolin's ulcer** ◇ **angreizh b. Marjolin** Seurtad kankr a 'r weuz traoñ evodet diwar devadoù sigaret.

marisque ◇ **marisca** ◇ **marisk** g. Yoc'henn vihan enlenet ouzh ribl ar fraezh, en dro dezhi ur c'holoenn groc'hen-glaourgenn, roufennet, blot ha dilaur, aspadenn ur wazrudez fibrozet.

marmorisation ◇ **marmoration** ◇ **marmoraat** Muiaat a-galz douester un askorn, aet fetis evel marbr ur parzh bras pe vrasoc'h anezhañ.

marque en bande des chromosomes ◇ **chromosome banding** ◇ **rezaoua ar c'hromozomoù** Lakaat war wel rezoù teñval ha sklaer war ar c'hromozomoù, diwar-bouez kalvezderioù diseurt hervez al livuzenn arveret : *rezaoua G* (Gl. *bandes G, Sz. G banding*) dre livuzenn Giemsa; *rezaoua Q* (Gl. *bandes Q, Sz. Q ban-ding*) dre ar c'hinakrin, kendreluc'hus el luc'h dreistmouk, h.a.

marqué ◇ **labeled** ◇ **tiellet** aao. A-zivout un danvezenn (seromalbumin, kellig wad, h.a.) o tougen un elfenn a gevaraezo spislec'hiañ he dehetadur hag he delenadur er bevedeg; an kez elfenn, *tieller* pe *merker* (Gl. *indicateur* pe *marqueur*), a vez pe un izotop skinoberiek erlec'hiet ouzh un atom anskinoberiek (¹⁴C ouzh ¹²C da skouer) en ur molekul, ul livuzenn gendreluc'hus dinoadus el luc'h dreistmouk, un antigen koc'hennel hennadet dre an hangaegendreluc'hañ (*tiellañ hangaeel*), un enzim spesadel d'ur gellig wad (*tiellañ kelligenzimatek*) (sl. *médecine nucléaire, radiopharmaceutique, scintigraphie, typage*).

marqueur, traceur ◇ **marker, tracer** ◇ **tieller g., merker g., olaer g.** Elfenn o reiñ an tu da spislec'hiañ an danvezenn ez eo bet lenet outi; *beverker* (Gl. *biomarqueur*) a reer eus un danvezenn a dalvez an dezventañ anezhi da zinoñ ur c'hleñved ha da heuliañ e zedroadur.

marqueurs de l'hépatite virale ◇ **viral hepatitis markers** ◇ **merkerioù an avufo viruzel** Antigenoù hag antikorfoù ar gwadveiz o testiñ un hepatit viruzel tremenet pe o tedeññ c'hoazh; evit an hepatit lemm B e vezont arglasket ent reizhiadek er

c'hreizennoù treuzskuilhañ, anezho an *antigen HBs* (*Ag HBs*), bezant nebeut a-raok hag e-kerz ar prantad klinikel; an *antikorf antiHBc* o tinodiñ en ur ser gant an *Ag HBs* hag o treistpadout dezhañ; an *antikorf antiHBs*, oc'h anadiñ a-c'houlerc'h, goude steuz an *Ag HBs* hag o trebadout pell amzer, hag eñ test an hangeañ.

marqueurs de membrane ou **de surface**, **antigène de différenciation** ◇ **membrane markers** ◇ **merkerioù koc'hennel** pe **gorreel**, **antigenoù diforc'hekaat** Molekul loet e gorre kelligoù 'zo, elfennoù luniek ar gwad pergen, a ro an hennaderezh anezho an tu da zinoiñ stad diforc'hekaat ar c'helligoù; talvezout a reont da risha al leukokit bonan ha kleñvedel ha da zewerzhañ an isgreadoù limfokit T4 ha T8.

marqueurs tumoraux ◇ **tumour markers** ◇ **merkerioù hanwe** Molekul ezreol pe bezant en ur feur ezreol er gwadvez, o testiñ revoud ha dedro yoc'hennoù kankrel 'zo gant un derez dizingal a spesadelezh, anezho : *proteinou rzhellel* (*ACE* : kolon ha youlc'h; *AFP* : avu ha klidenn); *proteinou torzhiennel* (*hCG* : torzhienn ha klidenn); *antigenou* (*PSA* : raksavenn; *TPA*, *CA* : skoedenn, vierez; *MCA* : *bronn*); *enzimou* (*PAP* : raksavenn; *NSE* : neuroblastom, kankr kelligoù bihan ar skevent); *hormonoù* (*kalkitonin*, *tiroglobulin* : skoedenn); pouezus int evit evshaat an dedro dreist holl — evit an diournat e tioueront kizidigezh ha spesadelezh.

Marshall : syndrome de ~ ◇ **Marshall's syndrome** ◇ **azoniad Marshall** Aneaz dianav e arbenn o tizhout ar vugale goude an oad a 3 bloaz, anezhañ barroù terzhienn 40°C o tarvezout bep 4 pe 6 sizhun hag o padout e-tro 5 devezh, kevret gant afoù er genoù, gargadennfo, c'hwarrennoù ec'honek er gouzoug, a-wechoù arzostoù, laurioù kof, ha bepred arouezioù tanijenn anspesadel; efedus war an azonou e vez ar c'hortikoidoù; e-tro ar gaezouregezh e c'hoarvez ar pare.

marsupialisation ◇ **marsupialization** ◇ **marsupelaat** Krafaelañ ouzh brielloù ar flañchadenn ribloù ar gavenn o chom e dilerc'h amzivenadur diglok ur c'hist, hag amparañ ur c'hodell heñvel ouzh hini ar marsupeled.

marteau hypothéar : **syndrome du** ~ ◇ **hypotheran hammer syndrome** ◇ **azoniad ar morzhol gouvozenn** Bleñchazoniad an ezel krec'h o tarvezout gant an hiniennou en ardiz daraezioù micherel ar palv, naouus, *ent klinikel*, dre un azoniad Raynaud untu gant heskwad lec'hiet en tri biz diwezhañ, *ent neuziadurel*, dre un darvoll eus lodenn dibenn an dalmerenn a-helmo gant steviadoù enfraouel e talmerennoù a-balv ar bizied.

martial ◇ **martial** ◇ **houarn**, **houarnel** aa. A-zave d'an houarn, sk. : *negez houarn*, *mezegadur houarnel*.

Martin et Petit : **sérodiagnostic de** ~ ◇ **serodiagnosis for Weil's disease** ◇ **gwadvezprouad g. Martin-Petit** Gwadvezprouad al leptospiroz iktergwadliñvel.

Martinet : **épreuve ou test de** ~ ◇ **Martinet's test** ◇ **prouad g. Martinet** Prouad strivañ war-benn gwiriañ ar stad kalongwazhiedel a-geñver gant embregerezh ur sport, anezhañ ober 20 plegadenn a 'n izili traoñ d'an talm a unan bep div eilenn; notet e vez ar pouz ha gwask ar gwad a-raok ha goude ar prouad, hag ivez e-doug an distro d'an aoz kent (sl. *effort* : *épreuve d'~*).

masculisme ◇ **ozhac'hegezh b.** Stad ur venev ganti un nebeut eilarouezioù gourevel evel ar barv, ar mourrou, astal ar mizioù, arsellet en oad eizik peurliesañ.

NOTENN : Kemm a lakaer etre an *ozhac'hegezh*, nes d'ur rizh neuzid, hag ar *c'houvegezh* (Gl. *virilisme*), lodek e kleñvedoù hormonel grevus an darn vras anezho (sl. *arrhéoblastome*, *Cushing : maladie de ~*, *féminisme*, *génitosur-rénal : syndrome ~*, *hirsutisme*, *macrogénitosomie précoce*, *virilisme*).

masochisme ◇ **masochism** ◇ **mazoc'hegezh b.** Troziadezh revel ma vez boziadur ar gouzrec'h e dalc'h ar gouzañvder pe an dismegañs (sl. *algolagnie*, *algophilie*, *paraphilie*, *sadisme*, *sadomaso-chisme*, *sexuels : comportements ~ déviants ou variants*).

massage ◇ **massage** ◇ **1 leuñviñ**, **leuñvad g. 2 merata** 1 (Ster hollek) arloañ ouzh korf ur gouziviad embregoù liesseurt gant an daouarn pe diwar-bouez nep araez en astenn da pe en arlec'h ouzh an daouarn. 2 Ren gant an daouarn ouzh gorre korf ur gouziviad embregoù dibarek (spinañ, gwaskañ, mezañ, rimiañ, h.a.); *Kuzul meur al Leuñvouriezh* (*Conseil Supérieur de la Kinésithérapie*), a laka kemm etre *merata yac'hadel* (Gl. *massage thérapeutique*), anezhañ ur prederiañ mezegel aotreet d'al leuñvourion diplomet nemetken, ha pleustradoù all evel ar *merata sportel*, *kenedourel*, h.a. (sl. *ébranlement*, *effleurage*, *fouillage*, *friction*, *hachure*, *kinésithérapie*, *percussion 2*, *pétrissage*, *tupotement*, *vibration*, La-18 219-234).

massage cardiaque ◇ **cardiac massage** ◇ **leuñviñ kalon**, **leuñvad kalon** Araezad defraouiñ amkanet, pa vez arsav kalon, da assav a-zifrae an amred gwad diziouerus d'an empenn ha d'ar galon, eleze gant ur gwask talmerel 7 pe 8 cm bevergant; dre al *l. k. a-ziavaez* pe *hep digeriñ* (Gl. *m. c. externe* pe *à thorax fermé*), e telanker diflist ar gwad diouzh ar c'hofig dre amwaskañ gorvez ar galon etre ar glerenn hag al livenn; dre al *l. k. a-zibarzh* pe *goude digeriñ* (Gl. *m. c. interne* pe *à thorax ouvert*), war lerc'h bruskenbenañ ha digeriñ an amgalonenn, ez amwasker ar galon a-gorvez etre ar meud hag ar biz yod pe etre an daou zorn.

masséter, TA *musculus masseter* ◇ **masseter muscle** ◇ **kigenn chageller** Kigenn greñv stignet etre gwereg ar voc'h (TA *arcus zygomaticus*) ha talbenn diavaez ar c'haved, he gwered lakaat houmañ da sevel.

masseur-kinésithérapeute ◇ **massor-kinesitherapist** ◇ **merataerbevfiñvour**, **leuñvour** Eiler mezegel diplomet oc'h embreg ar merata, ar gimnastik mezegel hag an addiorren arc'hwelel (sl. *gymnastique*).

massokinésithérapie ◇ **physiotherapy**, **USA physical therapy**, **physiotherapy** ◇ **Merataerezh-bevfiñvouriezh**, **Leuñvouriezh** Prederiadur dre ar merata hag ar fiñval, diskiblezh embreg gant eilerion mezegel diplomet (sl. *kinésithérapie*, Preder 112-113 3, La-09 344).

NOTENN : Mesk ez eus en arver ar c'hedrannoù *physio-* ha *physico-* hervez ar riezoù ha, da heul, hervez an aozerion : gwech e vez lakaet *physio-* da zaveññ d'ar Vevedouriezh ha *physico-* d'ar Fizik ha d'an araezioù fizikel, gwech ez arverer an eil hag egile evel kensterioù — da lakaat ivez ne glot ket eus ur riez d'ar re all an embregerezhioù lakaet dindan an anvadoù; da skouer, e Frañs e verk Gl. *physiothérapie, physiothérapie* an arver yac'hadel eus gwezherioù fizikel (adalek an dour betek ar c'horfoù skinoberiek).

mass-

• à doses massives a zoenadoù paoterek • *accumulation massive de graisses* hogennadoù bloc'hek druzennoù • *activation locale et massive du complément* blivadur lec'hiek ha bloc'hek ar glokaenn • *absorption massive de bière* euvriñ bier afonn • *absorptions massives de morphine* euvradoù fonnek morfin • *chaleur massive* gwrezder tolzel • *coefficiente massive d'atténuation* gwezhiader tolzel distav • *concentration en masse* tolzvec'h • *débit en masse* tolzkas • *embolie pulmo-naire massive* enfroù skevent bloc'hek pe kalzek • *énergie massive* gremmder tolzel • *force massive* nerzhder tolzel • *hypertrophie massive* usteñv bloc'hek • *inclure dans la masse* entoueziañ • *ingestion massive* euvriñ a-leizh • *inhalation prolongée ou massive de fibres d'amiante* dewntadur a-bad pe a-vloc'h eus edañvoù asbest • *la boue se transforme en masses solides* ez a ar fank e tolzennoù sonnel • *masse (grandeur physique)* tolz • *masse circulante* "tolz" pe ec'honad gwad amredat • *masse corporelle* tolz korf • *masse d'électricité* tredandolzid • *masse de protoplasme* tolzenn brotoplasm • *masse de substance molle résultant de la mastication* tolzennad vlot o tisoc'h eus ar chaokadur • *masse de substance nerveuse* bloc'h danvezenn nerval • *masse liquidienne* tolzennad liñvennoù • *masse molaire* pe *moléculaire*, "poids moléculaire" tolz mol • *masse volumique ou spécifique* tolzder ec'honel • *masses grises ou noyaux* tolzennoù louet pe gronnoù • *massif facial* atel ar fas • *massif médian de la face* tolzenn greiz ar fas • *massif osseux* tolzennad eskern • *noyau massif* kraoñell duzum • *pétrissage de vastes masses musculaires* mezañ tolzadour bras a gigennoù • *régression massive* argizañ avloc'h • *transfusion massive* treuzskuilhañ bloc'hel • *unité de masse atomique* unanenn tolz atom.

MAST : ~ **syndrome** ◇ **MAST syndrome** ◇ **azoniad MAST** Kleñved familhel dibaot, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, na gaver nemet er genel Amich, o kevredañ treuzzeizi dasstrizhek, migevaot, envedi ha loc'hadou koreoatetozek an izili.

mastectomie ◇ **mastectomy** ◇ **bronnezvenañ** Dazbidañ ar vronn.

mastication ◇ **mastication** ◇ **chaokat, chaokerezh g., chagellañ, chagellerezh g.** Breviñ ar boued gant an dent (sl. *coefficiente masticatoire*).

mastocytes ◇ **mast cells** ◇ **mastokit s.** Seurtad histiokit o revout ent reol er gwad kenglenel, er gwerblennoù, er felc'h hag e mel an eskern, kelligoù etre 25 ha 30 µm treuzkiz, enno ur graoñell vras, tuzum ha direolek, damguzhet alies gant greunennadoù metakromatek tev pe devoc'h, o teverañ eus kelligoù andiforc'hek eus ar gwad retikuloendotelel ; borc'hañ ha kadaviñ a reont an heparin, an histamin ha marteze an drenkenn hialuronek.

mastocytose ◇ **mastocytosis** ◇ **mastokitoz g.** Bezañs mastokit en ur gwad pe un organ, naouus d'an anaezioù kentael, kuñv alies, eus ar reizhiad retikuloendotelel, kantet peurliesañ en derm hag en epiderm (*m. dermel pur* pe *linadell livegat*) ; dibaot ez aloub an eskern, an avu, ar felc'h, ar gwerblennoù, ar gwad, ar skevent, al lounezhi, h.a. ; a-wechoù e vez un dedro grevus da seurt *m. strewek* (el leukemiezh da skouer).

mastodynie, mastalgie ◇ **mastodynia** ◇ **bronnost b.** Laur nervostel er vronn, en ervez da saezhenniñ war-du ar rannbarzhioù kefin, azon a stader e lies anaez eus ar wagrenn.

mastographie, mammographie ◇ **mastography** ◇ **bronnuniñ** Skinluniñ gwagrenn ar vronn, andarbar pe klokaet gant al laezhkaserluniñ (sl. *galactographie*).

mastoïde, TA processus mastoïdeus ossi temporalis ◇ **mastoid** ◇ **baleg g. ar vrennigenn, brennigenn b.** Balir kernennek loet e parzh traoñ an askorn ividig, enlenet ouzh ar gern anezhañ ar gigenn glerenn-trebez-brennigenn.

mastoidectomie ◇ **mastoidectomy** ◇ **brennigennenezvenañ** Trepanañ hag ezklazañ baleg ar vrennigenn, enkerzh ar vougev hag ar vougev gwezhiet evit prederiañ ar brennigennfo lemm.

mastoidite ◇ **mastoiditis** ◇ **brennigennfo g.** Tanijern ar baleg brennigenn o tont hogos bepred da heul ur skouarnfo diabarzh.

mastologie ◇ **mastology** ◇ **bronnouriezh b.** Studi ar vronn ken bonan, ken klañv.

mastopathie ◇ **mastopathy** ◇ **bronnanaez g.** Anvad rumm oc'h aroueziañ daskemmoù gwagrenn ar vronn, adalek an darwazh eeun betek ar c'hleñved kistel, en o zouez an darwazhoù miziaouel laurus, ar bronnusvent gwagrennel bloc'hel, ar bronnfoioù, h.a. (sl. *maladie kystique*).

mastopexie ◇ **mastopexy** ◇ **bronnAanlenañ** Gwezhiñ surjaniel amkanet da parraat ouzh ar bronnislink dre c'horren ar vronn hag he festañ ouzh kigen ar brennid.

mastoplastie ◇ **mastoplasty** ◇ **bronnatelviñ** Dazluniañ surjaniel ar vronn.

mastoptose ◇ **mastoptosis** ◇ **bronnislink b.** Gouzzad ar bronnoù.

mastose ◇ **mastosis** ◇ **mastoz g.** Anvad rumm kleñvedoù anfoel kuñv eus ar vronn (kleñved Reclus, kistoù ar vronn, h.a.).

masturbation ◇ **masturbation** ◇ **boloiñ, boloadur g.** Kefleuñviñ an organoù genel en amboaz dec'han an oriadell.

matérovigilance ◇ **materiovigilance** ◇ **dafargost g., dafargosterezh g.** Eveshaat, e sell da zinoñ miwredoù, an trevnadoù mezegel enstudadus pe get arveret da geñver an deznaouiñ pe ar prederiañ (sl. *hémovigilance, phar-macovigilance*).

maternage ◇ **mothering** ◇ **mammegañ** 1 Realezh ar vamm aketus da vastañ da ezhommoù bevedel ha kantaezel he bugel. 2 Pleustr ar bredkurañ e amkan pourchas d'ar gouziviad ar boziadoù a reas diouer dezhañ en e zarempred gant e vamm; *mammegour* a reer eus ar bredkurer o vammegañ.

maternalité ◇ **maternality** ◇ **mammelieth** b. Teskad an argerzhioù kantaezel diorreet gant ar vaouez o tont da vamm, desteriet gant mabvredvezeion 'zo evel un eizigenn.

maternité ◇ **1 motherhood** **2 pregnancy** **3 maternity hospital** ◇ **1 mammelezh** b. **2 brazedded** b. **3 gwiliouti** g. 1 Bezañ mamm. 2 Bezañ brazez. 3 Gwazrann ospital pe diazezhadur prevez ma vez hamouelet an dougerezed hag entiet an eskoradoured.

maternité de substitution ◇ ◇ **mammelezh en erlerc'h** Brazedded gant ur vaouez a zo bet ensteudet en he c'hrozh ur vi speriet evit ma c'hano ur bugel n'he deus ket engehentet.

maternisation, humanisation ◇ **humanization** ◇ **denvanekaat** Treuzfurmiñ kenaoz laezh ul loen evit he denesaat da hini al laezh denel.

matière médicale, pharmacognosie ◇ **materia medica** ◇ **materi** g. **mezegel, gwezheroniezh** b. Rann eus al liaoniezh o studiañ orin, doareoù deskrivadurel an holl wezherioù arveret en amkan parañ ar glañvourion (liaoù hag araezioù fizikel evel an tredan, ar skinoù X, h.a.).

matière, (-)matéri-

- *appareillage, matériel* binviadur • *biomatériau* bevzafarenn • *équipement, matériel* avead, aveadoù • *matériau* danvez, dafar, dafarenn • *matériel, physique* alvezel • *matériel, pièce* dafarenn • *matériel biologique, organique* dafar bevel • *matériel de suture* dafar krafaelañ • *matériel nucléaire* dafar kraoñellel • *matériau* dafarenn • *matériel chromosomique* dafar kromozomel • *matériel génétique* dafar hilel • *ma-tière, substance* danvezenn • *matière colorante* livuzenn • *matière grasse* druzenn • *matière plastique* mezell, danvez mezellek • *matière première* kentaozad • *matière sébacée* soav • *matières azotées* danvezioù nitrogenek • *matières fécales* oulennoù, mon, kaoc'h, kac'hadoù, egesta • *matières organiques* danvezioù bevel • *objet (matériel)* traezenn.

matité ◇ **dullness, flatness** ◇ **trommder** g. Perzh ar sten klevet pa giziatar ul lec'hienn eus ar c'horf, naouus dre un ton skiltr, ur read izel hag an diouer hangren; ent klasel e seller evel sten tromm skouer an hini ganet gant kiziata ar vorzhed.

matrice ◇ **1 matrix** **2 template** **3 matrix** ◇ **1 mammog** g. **2 pleuskenn** b. **3 oged** b. 1 Termen dispredet, sl. *utérus*. 2 Termen arveret e meur a ziskiblezh da arouezñ ur furmadur o talvout da lec'hienn diwanañ evit furmadurioù all (sl. *cartilage*); en Hiloniezh volekulel, gwidenn drenkenn nukleel o talvout da voul evit enaozañ ur widenn glokaus da geñver an dasparañ (sl. *réplication*). 3 Er Jedoniezh, teskad urzhiet $n \times p$ niver, stalet e rezh ur rezi n rez ha p bann; er Gleñvedouriezh, ez arverer an oged *devredañ* (Gl. *matrice de décision*), rezi karrezek evit dewerzhañ devredusted un arouez pe un imbourc'h amglinikenn.

matronisme ◇ ◇ **matronegezh** b. Unan eus azoniadoù Pende (sl. *hyperthymie, Pende* : *syndromes de* ~) : furm vorrder o tarvezout gant ar plac'hed bihan, kevret gant ur gaezoueregezh kenrat, ur paouez kreskiñ ha korrded, houmañ o wiskañ neuz korrded ar merc'hed odour; an arbenn kevarguzet eo skorted ar skoedenn gant uc'harc'hwel ar gaeuslounezhenn.

matr-

- *cellule matricielle du tube neural* mammgellig kanol an arc'hnerveg • *hérédité matrocline, matroclinie* hêrelezh vammduat, mammduadezh • *les cellules matriciel-les qui élaborent le poil* ar mammgelligoù o tanzen ar blev.

matur-

- *arrêt de la maturation de certaines cellules* arsav en azvedigezh kelligoù 'zo • *cellules restant immatures ou achevant leur maturation* kelligoù o chom anazv pe o peurazviñ • *dysmaturité* amazvedet • *évolution à partir des cellules souches abou-tissant aux cellules matures* endreñ adalek ar bongelligoù betek ar c'helligoù azv • *immaturité affective* diazvedet kantaezel • *immaturité vésicale* anazveded ar c'hwezhegell • *le degré de maturité du fœtus* derez azveded ar grouell • *le stade de la maturation* fazenn an azviñ • *nouveauté dysmature* nevezc'haned amazv • *sujet dysmature* amazved, idi • *sujet immature* hinienn diazv, diazved, -idi.

Mauriceau : **manœuvre de** ~ ◇ **Mauriceau's maneuver** ◇ **kefleuñvad** g. **Mauriceau** (Gwiliouderezh) Araezad eztennañ penn ar grouell gwilioudet da ziwezhañ en erload ar revr, anezhañ sankañ daou viz e-barzh genoù ar grouell, korf houmañ, kein el laez, o vezañ a-c'haoliad war arvrerc'h an oberataer, neuze treiñ war raok kilpenn ar grouell, gouzizañ an is-kilpenn dindan juntad ar c'haezour, kent plegañ penn ar grouell evit e zilemel eus ar c'hourzh.

maxillaire, TA **maxilla** ◇ **maxilla** ◇ **karvan** b. Askorn daoudañvat eus ar fas, oc'h amparañ an aven grec'h, ensteudet outañ an dent krec'h, ennañ ur gavenn, *kev ar garvan* (Gl. *sinus maxillaire*) (sl. *mandibule*).

maxillite ◇ **maxillitis** ◇ **karvanfo** g. Tanijenn ar garvan.

May-Grünwald-Giemsa : **coloration de** ~ ◇ **May-Grünwald stain** ◇ **arneañ May-Grünwald-Giemsa** Hentenn voas da arneañ kelligoù ar gwad dre an eozin hag ar glaz metilen.

May-Hegglin : **anomalie de** ~, **syndrome de** ~ ◇ **May-Hegglin syndrome** ◇ **ezreolder** pe **azoniad May-Hegglin** Azoniad familhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, naouus dre an olpladanoù hag ar vezañs trebadek, diouzh un tu, eus ebarzhennoù glazik (korfoù Döhle) e kitoplasm ar granulokit, diouzh an tu all, eus pladanoù keurel.

Mazzotti : **test de** ~ ◇ **Mazzotti's test** ◇ **prouad Mazzotti** Prouad arveret da zeznaouiñ ar filariaz : dre ensinklañ un doead bihan dietilkarbamazin, filarlazher kreñv, e tevouder loezadur an arvevaded hag un erwezh allergek (debron, daeraouiñ, terzhienn, bomm eleozinofil).

Meadows : syndrome de ~ ◇ **postpartum myocardiothy** ◇ **azoniad Meadows, kaherkalonnaoued g. dianwilioud** Falladur kalon, kentael war hañval, o tarvezout e dibenn ar vrazezded ha dreist holl un nebeut sizhunvezhioù goude ar gwilioud, gant merc'hed yac'h o c'halon, oc'h erzerc'hañ dre ur geurgalonegezh gant arouezioù usvent ar c'hofig kleiz, goulifvoù, enfreier a-wechoù; o tedreñ etrezek ar pare peurliesañ, nemet oc'h adfeilhañ alies da geñver ar bec'hiegiou da heul.

méat, 1 TA meatus 2 TA ostium ◇ **1 meatus 2 ostium** ◇ **1 ode b. 2 gwask g.** 1 Unan eus peder strishaenn kavenn ar fri, etre speur ar gavenn hag ar grogen draoñ (*ode draoñ ar fri*), ar grogen greñn (*ode greñn ar fri*), ar grogen grec'h (*ode grec'h ar fri*), hag etre ar grogen grec'h hag ar grogen uc'hañ (*ode uc'hañ ar fri*). 2 Igoren ur ganol, sk. : *gwask diavaez ar c'han troazh* (TA *ostium urethrae externum*).

méatoscopie urétérale ◇ **ureteral meatoscopy** ◇ **gwaskengweliñ ar san droazh** Imbourc'h gwaskoù ar san droazh dre araez ar c'histoskop (sl. *cystoscope*).

méatotomie ◇ **meatotomy** ◇ **gwaskenbenañ** Flañchañ gwask ar c'han troazh evit muiaat treuzkiz an igoren.

mécánogramme ◇ **mecanogram** ◇ **treloc'hwezd g.** Kevregad graet dre lerc'hwezañ loc'hadoù ha froumadoù dec'hanet gant arc'hwel un organ : tosoù kern ar galon (*kalongerdresenn*, sl. *apexocardio-gramme*), lammoù ar gwazhiennoù (*gwazhiennndresenn*, sl. *phlebogramme*), an talmerennoù (*talmdresenn*, sl. *sphygmogramme*, *gwasktresenn*, sl. *piézo-gramme*), trouzoù ar galon (*kalonstendresenn*, sl. *phonocardiogramme*).

mécánothérapie ◇ **mecanotherapy** ◇ **treloc'hyac'haat** Hentenn brederiañ, anezhi lakaat ar c'henvelloù dindan fiñvadoù oberiat ha gouzañvat dre araez ardivinkoù arbennik (sl. La-18 227-229).

mécán-

- *action mécanique* gwezhañ treloc'hel
- *agent mécanique* gwezher treloc'hel
- *biomécanique* Bevloc'honiezh
- *dissociation électromécanique* distroll tredanel-treloc'hel
- *dystocie mécanique* mieskor treloc'hel
- *iléus mécanique* stoc'had treloc'hel
- *le mécanisme de l'état de choc* gwikefre ar bleuz
- *mécanique* Loc'honiezh, loc'honiell, treloc'herezh, treloc'hel
- *mécanisme immunologique* gwikefre hangael
- *traitement mécanique* mezegeñ treloc'hel.

méchage ◇ **gauze plugging, paking** ◇ **poulc'hañ, poulc'hadur g.** Dodiñ ur boule'henn.

mèche ◇ **strip of gauze, wick** ◇ **poulc'henn b.** Lurell vihan gazenn a chouker en ur gouli evit araezañ ar gwadkae pe mirout ouzh ur c'hleizennañ re brim, pe a sanker e-barzh treug ur fic'h evit aesaat diver al levruzenn pe al lin.

méconium ◇ **meconium** ◇ **mekoniom g.** Danvezioù leteñvel, dre o livrezh azgell pe azgwer hag o c'hantalc'h toazek, ouzh sun ar roz moc'h, bezant e-barzh pervez ar grouell hag, ent reol, ezvountet nebeut goude ar c'hanedigezh.

médecin ◇ **physician, medicinae doctor, M.D.** ◇ **mezeg g. -eion** “Den bet darbennet kantreol en ur skol vezekniezh angemeret ent dezvel er riez m'emañ, graet berzh gantañ er roll studi erverket ha gounezet ar perzhedurioù en laka barrek da embreger ar vezekniezh (ergurañ, deznaouiñ, prederiañ, azgouestaat) hervez e ervrederezh piaouel, war-benn herouezañ yec'hed ar strollenn hag an hinenn” (Aozadur Bed ar Yec'hed, 1972) (sl. *généraliste, spécialiste*).

médecin agréé ◇ ◇ **mezeg kantiunet** E Frañs, mezeg (hollegour pe arbennigour) anvet gant ar prefed evit reoliñ ha kevarouezañ izili pe danvez izili an amaezh foran.

médecin-conseil ◇ **consulting physician** ◇ **mezeg alier** Mezeg enfredet gant un aozadur kretaat foran pe brevez, pe un embregerezh, evit reiñ e veno e diarsell an dezvadur kevredigezhel war stad yec'hed ar gretaidi, ar wireion pe an implijidi goulenner gouzeuladoù, a-geñver gant erskrivadurioù ar vezeion a ra war o zro.

NOTENN : Betek 1960 e veze arveret an anvad *mezeg reoler* (Gl. *médecin contrôleur*). A du 'rall e ranker lakaat kemm etre *mezeg alier* ha *mezeg kuzulier* (Gl. *consultant, médecin sapiteur*, sl. *consultant 2*).

médecin conventionné ◇ ◇ **mezeg kenouestlet** Mezeg angorzhet gant ur c'hendivizad skoulmet etre ar C'hedskor hag ar c'hweluniadoù mezegel.

médecin correspondant ◇ ◇ **mezeg keñverek, keñvereg g. -eion** Hervez kendivizad mezegel 2004, ez eo ar *m. k.* an arbennigour ez eo daveet dezhañ ar gouziviad gant e vezeg pennañ; nebeutoc'h e vez dastalet briwerzh an arbennigour d'ar gretaidi a ya dezhañ war eeun.

médecin à exercice particulier ◇ ◇ **mezeg embregour dibarek** Termen amaezhel oc'h arouezañ embregourion ar mezekniezhoù dazeilat (homeopatiezh, mezoterapiezh, nadozwanerezh, osteopatiezh, h.a.).

médecin habilité ◇ ◇ **mezeg engwiriet** Mezeg leuret gant Aotrouniezh uhel ar yec'hed (Gl. *Haute autorité de santé*) evit andalañ embregoù micherel e genvreudeur.

médecin requis ◇ ◇ **mezeg rekizet** Mezeg endiret gant un aotrouniezh amaezhel pe barnerezhel da gefleuniañ ur gefridi en domani lezennvezegel.

médecin sentinelle ◇ ◇ **mezeg geder** Embregour perzhiat en ur rouedad arseliñ ha diurnat kleñvedoù 'zo en amveziadoù beziat, e stern ar studi reuziadoniel anezho.

médecin territorial ◇ ◇ **mezeg tiriadel** Mezeg goprat fiziet ennañ gant ur strollelezh (keoded, ranndir, departamant) ar garg da luskañ ha da reoliñ an obererezh e domani ar gward hag ar yec'hed kevredik (mezekniezh vicherel hag erguradel, yec'hedouriezh ha diogelerezh, gwarezerezh ar mammoù hag ar vugale, h.a.); hag eñ arsoziad, kevratad pe entitled, gantañ en dro-mañ diwezhañ dezvad un amaezhiad a 'r strollelezhioù tiriadel.

médecin traitant ◇ ◇ **mezeg kentañ** E Frañs, hervez kendivizad mezegel 2004, ez eo ar *m. p.* an *embregour en amoug kentañ* (Gl. *praticien de premier recours*), pe a ensamm prederiañ ar c'hlañvour, pe a ziviz e zaveiñ etrezek ur *mezeg keñverek* (sl. *médecin correspondant*); da bep kretaed eo dleet diskleriañ d'e gef kedskor ar mezeg kentañ en deus dibabet; da heul, e kaougant ar c'hef an *erolad arouelioù kenurzhiet* (Gl. *parcours de soins coordonnés*) a zo aotreet d'ar c'hreataed heuliañ etre e vezeg kentañ hag ar vezeion geñverek.

NOTENN : Ur skritell amaezel hep mui eo amañ an hogozenn "*traitant*", ganti un dislavar furlmel n'hon eus abeg ebet da zegemer e rezh ur c'hevatal * *mezeg prederier*; rak dre embreger ar gefridi digen ez eo dres e hini, daveiñ e arvalion etrezek mezeion all, e tiouer ar *médecin traitant* e roll a brederier; e emell eo hini an embregour a raed anezhañ ar "mezeg familh", eleze klevout ouzh e arvalion, o frederiañ e unan pe o fiziout en arbennigourion.

médecine ◇ **medicine** ◇ **mezekniezh b.** Studi ar c'hlañvedoù hag embreger an arz d'o frederiañ.

médecine de catastrophe ◇ **disaster medicine** ◇ **mezekniezh dirfeud** Skourr a 'r vezekniezh oc'h ensammañ an arouelioù trummat da bourchas d'un niver bras a dud da geñver ar gourmestoù naturel (douargrenoù), darvoudel (dezougouù boutin) pe kouel (darougadoù).

médecine du travail ◇ **occupational medicine** ◇ **mezekniezh al labour** Furm eus ar vezekniezh kevredigezhel, dezhi da amkan, erguradel hepken, hepkoriñ nep darallad a 'r yec'hed dre benn al labour.

médecine esthétique ◇ **aesthetic medicine** ◇ **mezekniezh wezeladel** Teskad an araezadoù amkanet da heneuziañ ar c'horf, diren ar borrdier, ar behindoñv ha koshadur ar c'hroc'hen; amoug a c'houl ar *m. g.* digant ar groc'henouriezh, ar wazhiennouriezh hag, e degouezhioù 'zo, digant ar surjianerezh; embregouriezh houmañ nad eo ket angemeret gant Urzh ar vezeion (sl. *chirurgie esthétique, chirurgie plastique*).

médecine exotique ◇ **tropical medicine** ◇ **mezekniezh trovanel pe arallhin** Skourr ar vezekniezh gouestlet d'ar c'hlañvedoù dastumet dindan hinadoù estreget hini Europa, peurliesañ poreoù hag arvevadegezhioù (*paludegezh, terzhienn velen, kolera, kleñved ar c'houk*).

médecine expérimentale ◇ **experimental medicine** ◇ **mezekniezh arnodel** Meizad kenradet gant Claude Bernard en e striv da reiñ diazezoù skiantel d'ar vezekniezh, oc'h ergemenn an arnoderezh war al loened bev (dazbidañ organoù, diounit danvezennoù pistriek, enkoriñ poreoù) war-benn meizañ ar vevedouriezh hag ar gleñvedouriezh denel; da notañ e vez astennet d'an denion gant renadoù riezal 'zo hentennoù ar vezekniezh arnodel.

médecine factuelle, médecine fondée sur les preuves ◇ **evidence-based medicine, EBM** ◇ **mezekniezh devoudel pe anatadel** Keal dec'heriet e 1980 en e furm saoznek gant Gordon Guyatt eus skol vezekniezh McMaster (Kanada), ha despizet : "korvoadur aketus, ezhleg ha deznadus eus ar roadennoù hegerz gwellañ war-benn kemer an disentezioù evit a sell prederiañ ar c'houziviaded, [...] embregadur gougevaniñ pep kevarouezad klinikel ouzh ar roadennoù klinikel diavaez o tisoc'h eus an imboure'hioù reizhiadek"; hevelep daveiñ kendalc'hek eus stadadennoù unveziat d'ur c'horf hollveziat a anaoudegezhioù klinikel nevezet bemez a amplex ur stlennekaat na oa ket anezhañ a-raok dibenn an 20t kantved.

médecine générale ◇ **general medicine** ◇ **mezekniezh hollek** Embregouriezh astennet da holl skourroù ar vezekniezh; abaoe 2004, ent lezennel e Frañs, emañ ar *m. h.* renket e-touez an arbennigiezhoù — nemet e talc'her da gevenebañ *hollegour* hag *arbennigour* (sl. *généraliste, médecin correspondant, médecin traitant*).

médecine humanitaire ◇ **humanitarian medicine** ◇ **mezekniezh denegour** Kedrann vezegel ar skoazell denegour, a wir voz ha dizalc'h diouzh nep galloud riezal, he amkan gwarediñ reuzidi ar brezel ha gwalennoù all (gourmestoù naturel, darreuziadoù, naonegezhioù, mivagadur, paourentez).

médecine interne ◇ **internal medicine** ◇ **mezekniezh diabarzh** Arbennigiezh, ospitalel peurliesañ, o plediñ gant an anaezioù n'emaint ket e dalc'h un arbennigiezh savelet, evel ar c'hlañvedoù reizhiadel (Gl. *maladies systémiques*), al lupuz eritematus strewek, kleñved Gougerot-Sjögren da skouer, pe ar c'hlañvedoù hangaer; "arbennigour a 'r vezekniezh hollek" e reer a-wechoù eus an diabarzhour, pa vez fiziet stummadur ar vezeion hollek er gwazrannoù mezekniezh diabarzh (sl. *chirurgie, interne : méde-cine ~, interniste*).

médecine légale ◇ **forensic or legal medicine** ◇ **mezekniezh lezennel** Skourr an embregouriezh vezegel o plediñ gant keñverioù ar vezekniezh gant ar gwir.

médecine libérale ◇ ◇ **mezekniezh frank, frankvezekniezh b.** Mezekniezh embreget hervez ar pennaennoù-mañ : a-berzh ar c'hlañvour ar gwir da zibab e vezeg, a-berzh ar mezeg ar gwir da zibab lec'h e stal, da zivizout e ordenadurioù ha da zegemer e vriwerzhioù war eeun digant e arvalion, an endalc'h hag ar gwir da zerc'hel ar rin micherel; dav eo notañ e tenn ar gwirioù-se, ken re ar c'houziviaded, ken re ar vezeion, da gurzhañ gant dedro armerzhel ha politikel ar c'hevredigezhioù.

médecine nucléaire ◇ **nuclear medicine** ◇ **mezekniezh derc'hanel** Skourr ar vezekniezh ma arverer ar skinizotopou en amkanioù deznaouiñ (da skouer, ar skingannluniñ) pe yac'haat (sl. *césium 137, cobalthérapie, curie-thérapie, isotope*).

médecine opératoire ◇ **operative surgery** ◇ **mezekniezh oberatael** 1 Mezekniezh o plediñ gant ar gwezhioù surjanel. 2 Studi ar gwezhioù war ar c'helanoù.

médecine périnatale, périnata/ologie ◇ **perinata/ology** ◇ **mezekniezh troc'hanedel, troc'hanedouriezh b.** Studi an anadennoù bonan ha kleñvedel o tarvezout gant ar vamm ha/pe ar bugel a-raok pe goude ar gwilioud (sl. *néonata/ologie, puériculture*).

- médecine physique** ◇ **physical medicine** ◇ **mezekniezh fizikel** Diskiblezh vezegel oc'h arverañ dreist holl kalvezderioù bevfiñvel ha gwezherioù fizikel evit prederiañ anaezioù diseurt ha da gentañ direizhoù ar benvegad emzilec'hiañ; da arbennigiezh eo bet angermet e Frañs e 1965 evel *addiorren arc'hwelel hag azgouestaat* (Gl. *rééducation fonctionnelle et réadaptation*) (sl. *massokinésithérapie*).
- médecine prédictive** ◇ **predictive medicine** ◇ **mezekniezh darganañ** Rann ar vezekniezh amkanet da andalañ riskloù kleñvel un hinienn hervez an naousterioù hilel anezhi.
- médecine préventive** ◇ **preventive medicine** ◇ **mezekniezh ergurañ** Studi hag arloañ an araezioù o parraat ouzh ar c'hleñvedoù (sl. *hygiène, prévention, prophylaxie*).
- médecine scolaire** ◇ ◇ **mezekniezh skolel, mezekniezh an deskadurezh riez** Skourr ar vezekniezh kentradet e Frañs e 1945, evit hamouelañ ar vugale adalek ar skol vamm betek al lise, dre aozañ imbourc'hioù yec'hed endalc'hek, perzhiañ en o desaverezh bonanvezel hag eveshaat ar yec'hedouriezh er skolioù.
- médecine sociale** ◇ **social medicine** ◇ **mezekniezh kedvuhez** Arloerezh an anaoudegezhioù mezegel ouzh aozadurioù ar gedvuhez (kedskor, kleñvedoù micherel, yac'husted ar stavelloù, h.a.).
- médecine thermale** ◇ **thermal medicine** ◇ **mezekniezh havel** Skourr ar vezekniezh gouestlet d'ar prederiadur dre an havioù ha d'ar c'hurioù havdrevel.
- médecine vétérinaire** ◇ **veterinary medicine** ◇ **milvezekniezh b.** Studi kleñvedoù al loened hag embreger an arz d'o frederiañ.
- médecines alternatives** ◇ **alternative medicine** ◇ **mezekniezhoù dazeilat** Doareoù prederiañ kinniget en erlec'h ouzh ar vezekniezh klasel, kefridiel; anvadoù all arveret evit an hentennoù dazeilat : *m. klokaat* (Gl. *m. complé-mentaires*), *m. erlec'hiat* (Gl. *m. de remplacement*), *m. kuñv* (Gl. *m. douces*), *m. diastur* (Gl. *m. parallèles*).
- média, TA tunica média** ◇ **tunica media** ◇ **krennsae b.** Gwiskad etre eus speur an talmerennoù, lec'hiet etre an *ensae* (sl. *endartère*) hag an *ezsae* (sl. *externa*), gweleadoù kahergelligoù ha gwiennoù dastennek ouzh he ober.
- médiacalcosse, médiacalcinose** ◇ **Mönckeberg's arteriosclerosis** ◇ **mediakalkoz g., skleroz g. Mönckeberg** Seurtad skleroz an talmerennoù, naouus dre zic'henezhadur ha razekadur gwiennoù kaherel ensae an talmerennoù a gavnez etre, kevredet alies gant an aterom.
- médiacalcosse coronaire** ◇ ◇ **mediakalkoz kurunerel** Anaez o tizhout ar vagadell dindan 3 miz, naouus dre ur skorted kalon trumm ha marvus gant kalonusvent, uswask talmerel, arouezioù kalonvarwezadel heskwad-marvenn ha razekadurioù talmerel hollek.
- médial, TA medialis** ◇ **medial** ◇ **kreizel aa.** Hogozenn arveret er Gorfadurezh gant ar ster "nesoc'h da ahel kemparzh ar c'horf", a-gevenep d'an hogozenn *kostezel* (Gl. *latéral, TA lateralis*); kent an destladurioù PNA ha TA, er steroù-se e raed gant *diabarzh* (Gl. *interne*) ha *diavaez* (Gl. *externe*).
- médianécrose** ◇ **medial necrosis** ◇ **medianekroz g.** Marvenn krennsae an talmerennoù dastennek, sk. : *m. hennadek an aortenn* (Gl. *m. aortique idiopathique*), *m. enrec'hus an aortenn* (Gl. *m. disséquante de l'aorte*), *m. kistel an aortenn* (Gl. *m. kystique de l'aorte*) (sl. *dissection aortique*).
- médiastin, TA mediastinum** ◇ **mediastinum** ◇ **poullkreiz g.** Rannbarzh kreizer kavenn ar brusk, loet etre an div skeventenn, ar glerenn hag al livenn gein, oc'h enderc'hel ar galon hag ar gwazhied bras, ar vriant hag ar bronkez eszkeventel, an treizher, an toazon pe an dilerc'h anezhañ ha limfforzhioù niverus; e rannañ a reer dre un dalenn a-dreuz o tremen dre forc'h ar vriant etre 1) *kavenn arao* ha *krenn ar poullkreiz* (TA *cavum mediastinale anterius et medius*), enni ar galon, gwareg an aortenn, an div wazhienn gav, dilerc'hioù an toazon ha gwriziennoù ar skevent, ha 2) *kavenn adreñv ar poullkreiz* (TA *cavum mediastinale posterius*), enni ar vriant, an treizher, an aortenn vrusk a-ziskenn, ar gwazhiennoù ampar ha san ar brusk.
- médiastinal : syndrome** ~ ◇ **mediastinal syndrome** ◇ **azoniad poullkreizel** Teskad an azonoù diwar an amwask war an organoù loet er poullkreiz : trec'hwezh, brelonk, mouezhvibar, reñver an amred gwazhiennel er brusk.
- médiastinite** ◇ **mediastinitis** ◇ **poullkreizfo g.** Tanijenn e gwriad kellaouek ar poullkreiz.
- médiastinographie gazeuse** ◇ **pneumomediastinography** ◇ **poullkreizluniñ aezhennel** Er c'hwiliañ skinnunadel ar poullkreiz goude aereusinklañ gwezhiet a-dreuz speur ar vriant war-benn lakaat war wel trolinenn an organoù ha yoc'hennoù ar poullkreiz; araezad dilezet.
- médiastinoscopie** ◇ **mediastinoscopy** ◇ **poullkreizengweliñ** Luc'hwereañ parzh krec'h ar poullkreiz diwar-bouez un endoskop ebarzhzet dre un hent us-klerenn, imbourc'h o kevaraezañ ar bevsav.
- médiastinotomie** ◇ **mediastinotomy** ◇ **poullkreizenbenañ** Anvad rumm ar gwezhoù amkanet da ziraez an organoù loet er poullkreiz (bronkez, briant, treizher); operata a reer pe dre an hent us-klerenn (*gwez Gatellier*) pe dre zazbidañ ledok pe ledokoc'h ar glerenn ha migern ar c'hostoù (*p. arao*).
- médiat** ◇ **mediate** ◇ **handizhek g., a-handizh** 1 A-zivout ur gwez, un imbourc'h graet dre araez un ardivink (sl. *auscultation*). 2 A-zivout un argerzh na c'hell c'hoarvezout nemet dre hantererezh un argerzh all (sl. *cicatrization*).
- médiateur chimique, neuromédiateur, neurotransmetteur** ◇ **chemical mediator, neuromediator, neurotransmettor, neurotransmitter** ◇ **hanterad g. kimiek, nervhanterad g., nervdreuzkaser g. -ioù** Danvezenn dilaosket gant gwiadoù 'zo

(dibennoù nerved, gwagrennoù) hag o vont da werediñ war wiadoù all ; en nerved, e treuzkasont ar broud (ar stlenn) e par ar sinapsoù eus un neuronenn d'unan all pe d'un organ ; anezho seurtadoù niverus, en o zouez an aketilkolin, an noradrenalin, an dopamin, ar serotonin, an histamin, an drenkenn γ -aminobutirek (GABA), h.a. ; pep hini anezho o werediñ war ur *buzer* (Gl. *récepteur*) spesadel d'ur gwered bevoniel dibarek (sl. *acétylcholine, adrénaline, catécholamines, dopamine, histamine, sérotonine*, La-18 38-39).

Medicaid Er Stadoù-Unanet, reizhiad kretadur kleñved e gounid an izelloaziaded.

médical ◇ **medical** ◇ **mezegel** aa. A-zave d'ar vezekniezh pe d'ar vezeion.

médicament ◇ **drug, médicament, medicine** ◇ **lia** g. -où, **gwezher** g. -ioù “Nep danvezenn pe genaoad erzodet evel araez kurañ pe ergurañ e-keñver ar c'hleñvedoù denel pe loenel, ivez nep aozad diounezadus d'an denion pe d'al loened e sell da savelañ un deznauo mezegel pe da assav, dereizhañ pe daskemmañ an arc'hwelioù organel anezho” (Dezveg foran ar Yec'hed, Frañs, 1967) ; d'ober al lia ez a ar *bon* (sl. *base 4*), ar *gwezher harpañ* pe *harpad* (sl. *adjuvant 2*), an *ambrougenn* (sl. *excipient*), ar *reizhuzenn* (sl. *correctif*) ; lies tennad zo da gentraderezh ul lia : 1) an imboure'hiou raklinikel, graet war gelligoù, gwiadoù, organoù dredet ha neuze war loened ; 2) an imboure'hiou klinikel, anezho re ar *bazenn I*, arnodet war youladed yac'h, ar *bazenn II*, renet war un nebeut klañvourion diuzet, ar *bazenn III*, war gouziviaded niverusoc'h hag e-skoaz prederiadurioù dave, ar *bazenn IV* o teraouiñ gant ar brientad mont en nevid (sl. *autorisation de mise sur le marché, double anonymat : épreuve en ~*, La-09 336-343).

médicament à prescription restreinte ◇ ◇ **lia erskrivadur argrenn** E Frañs, hervez deved 2004, lia eus unan a 'r pep rumm-mañ : 1° Amberzet evit an arverañ ospitalel ; 2° amberzet evit an erskrivañ ospitalel ; 3° amberzet evit un erskrivañ ospitalel deroù ; 4° amberzet evit mezeion arbennikaet 'zo ; 5° o rekizañ un evezhierz dibarek.

médicament-conseil ◇ **over the counter, OTC** ◇ **lia dreist ordren** Lia prenet hep ordrenañs diwar ali an apotiker ; un traezad nevidadus eo, na vez ket dastalet gant an aozadurioù kretaat.

médicament d'exception ◇ ◇ **lia nemedennek** Lia arveret en un ennegad resis, gwerzhet en ur priz uhel ; erskrivet e vez war un ordrenañs arbennik.

médicament essentiel ◇ **essential medicine** ◇ **lia bonel, bonlia** g. Lia despizet gant Aozadur Bed ar Yec'hed (ABY) evel o vostañ da ezhommoù yec'hedel muianiver ar boblañs ; hegerz e tle bezañ ar bonlioù e pep amzer a gementadoù hag en deluniadoù kevazas, en ur priz araezadus gant an hiniennoù hag ar strollenn ; aliet e vez pep riez da sevel he roll bonlioù en ur zerc'hel kont eus an tevetoù lec'hel ; reoliek ez embann an ABY rolloù skouer ar bonlioù dezreet diwar ar rolloù riez.

médicament éthique ◇ **prescription only medicine** ◇ **lia ordrenadur** Lia gwerzhet en apotikerezhioù hepken, diwar ordrenañs, nad eo ket nevidadus e briz, dastaladus gant an aozadurioù kretaat.

médicament générique ◇ **generic pharmaceutical** ◇ **lia genadel** “Eilad diwar ul lia orinel bet aotreet ar c'henderc'hañ hag ar c'henwerzhelañ anezhañ da heul soetadur ar breou en goudore” (Frañs, *Kengor ar c'hevezañ hag ar bevezñ*, 1981).

médicament grand public ◇ **over the counter, OTC** ◇ **lia pep kevredig** Brientaozad bet debaret dezhañ ur brientad mont en nevid, aotreet d'an daranverezh, hegerz en emservij e-barzh an apotikerezhioù hepken, gwerzhet kuit a ordrenañs, andastaladus gant an aozadurioù kretaat (sl. *spécialité*).

médicament magistral, préparation magistrale ◇ ◇ **mestrangevezh** g. Lia n'emañ ket war roll al Liavoneg (Gl. *Pharmacopée, Codex*), danzeet gant an apotiker hervez un ordrenañs savet gant ar mezeg.

médicament officinal, préparation officinale ◇ ◇ **bonangevezh** g. Lia a gaver darbarek en apotikerezh, bet aozet hervez un delun enskrivet el Liavoneg, da skouer an tentur iod (sl. *iode : teinture d'~*).

médicament orphelin ◇ **orphan drug** ◇ **lia emzivat** Danvezenn liael, na ve ket dreistezhomm, dihegerz dre benn ma n'eo ket askorus he c'horvoiñ.

médicament soumis à prescription ◇ **prescription drug** ◇ **lia erskrivadur** Lia ordrenadur ret, eleze berzet ouzh an apotiker e c'hougorañ hep ordrenañs ; e Frañs, da heul deved Kerzu 1988, emañ enskrivet al liaoù erskrivadur war div listenn : an danvez-ennoù dañjerus war al *Listenn I* (bet *Taolenn A* kent 1988), an danvez-ennoù pistriek war al *Listenn II* (bet *Taolenn C*) ; renket emañ liaoù an *daolenn B* a wechall war *Listenn ar baderioù* (Gl. *Liste des stupéfiants*) (sl. *stupéfiant, toxique*).

1 2 3 médicaments ◇ **1 2 medicinal 3 caused by a medicine** ◇ **1 liaek** aa. **2 liael** aa. **3 liaien** aa. 1 A-zivout un danvezenn, ganti perzhioù yac'haat. 2 A-zave d'al liaoù. 3 (Anaez) devoudet gant ul lia, sk. *ekzema liaien* (sl. *médicinal*).

Medicare Er Stadoù-Unanet, reizhiad kretadur kleñved e gounid an henaded.

médication ◇ **medication** ◇ **mezegañ, mezegadur** g., **mezegiezh** b., **gwezheriañ, gwezheriadur** g. Diounit un pe lies gwezher yac'haat e sell d'un ennegad dibarek (sl. *prémédi-cation*).

médicinal ◇ **medicinal** ◇ **liaek** aa. A-zivout ur gwezher a orin naturel (struzh, hav), gantañ perzhioù mezegañ (sl. *1 médicamenteux*).

MEDLARS (Gwreskanv diwar Sz. *MEDical Literature Analysis and Retrieval System* [*Reizhiad dezrannañ ha degerc'hañ al lizheradur mezegel*]), reizhiad levrlennadurezh niverelaet setez e *National Library of Medicine* ar Stadoù-Unanet, embanner an *Index Medicus*.

MEDLINE (Gwreskanv diwar Sz. *MEDlars on LINE* [MEDLARS keflinenn]), gouezvon a oa ennañ e 2012 21,6 milion a bennadoù o tont eus 5 582 embannenn.

médic-

• *action simultanée de deux médicaments* kenwered div vezegiezh • *cinétique d'un médicament* korzh ul lia, liagorz • *forme médicamenteuse* furm diounit ar gwezherioù • *forme médicamenteuse constituée de deux gélules* furm wezher o c'hoarvezout a zaou volc'han • *matière médicale* materi mezegel • “*médiquer*” gwezheriañ • *prémédication* rakwezheriadur • *prémédiquer* rakwezheriañ • *substance médicamenteuse* danvezenn yac'hadel, yac'hwezher • *synergie médicamenteuse* kedal mezegiezhel • *traitement médicamenteux* gwezheriadur • *utilisation médica-menteuse d'une substance* arver yac'hadel un danvezenn.

médullaire ◇ **medullary** ◇ **1 (-)melel** aa. **2 (-)mezonel** aa. **3 mezonenn** b. 1 A-zave a) d'ar mel a-livenn : *melel* pe *livennvelel*; b) a-zave da vel an eskern : *melel* pe *askornvelel*. 2 A-zave d'ar *vezonenn*. 3 Lodenn greiz un organ a-gevenep d'ar *gaenenn* pe lodenn drobarzh, sk. : *mezonenn* ar *wagrenn* *uslounezh* pe *mezonuslounezhenn*.

NOTENN : Pa vez anv eus an eskern, e reer gant Gl. *corticale*, Br. *kaenenn* da envel al lodenn galet trobarzh, nemet, dindan ar gaenenn emañ, hervez stumm an askorn, ar *gwiad* *spoueek* (Gl. *tissu spongieux*) pe ar *mel* (Gl. *moelle*) o c'henniñ kavenn greiz an askorn, pe *kavenn* ar *mel* (Gl. *cavité médullaire*).

médullectomie surrénale ◇ **adrenal medullectomy** ◇ **mezonennezvenañ uslounezhel** Dazbidañ un darn eus *gwiad* ar *vezonuslounezhenn*, oberatadenn bet gwezhiet evit parraat ouzh an elruz (Gl. *polycythémie*) gant *uswask* pe an *uswask* talmerel trebadek digenvez.

médullisation ◇ **medullization** ◇ **melarlankañ, melarlankadur** g. Usteñv mel an eskern hir diwar *goust* ar steuñvenn stank, argerzh o tarvezout en osteoporoz.

médulloculture ◇ **medulloculture** ◇ **meldiñvañ** Hadennañ ur metoù tiñvañ gant mel eskern erlamet dre drepanañ pe ezwanañ (klerenn) war glask da vakteri.

médulosurrénale ◇ **medulloadrenal gland, adrenal or suprarenal medulla** ◇ **mezonuslounezhenn** b. Lodenn greiz (*mezonenn*) ar *wagrenn* *uslounezhel*, bezant enni ar c'helligoù kromlen a zo o arc'hwel borc'hañ ar c'hatekolaminoù, anezho gant an den : an *adrenalin* (etre 78 ha 91 %) hag an *noradrenalin* (etre 9 ha 22 %) (sl. *adrénaline, catécholamines, cellule chromaffine, corticosurrénal : hormones* ~es).

Mees : lignes ou bandes ou stries de ~ ◇ **Mee's lines** ◇ **rezoù** l. (b.) **Mees** Rizennoù diadrez arwenn a stader war an ivinoù da geñver ar pantiadur dre an arsenik.

1 méga- **2 (-)mégal(o)-** ◇ **1 mega-** **2 (-)megal(o)-** ◇ **1 mega-** **2 keur-**, (**us**)-vent g., -voll g.), **mega-** 1 (Arouez M) rakger oc'h arouezñ 10⁶. 2 Rakger oc'h arouezñ ar reñver ment (hed, led, kavnez).

méga-artère ◇ **enlarged artery** ◇ **usvoll** g. **talmerenn, talmerennusvoll** g. Reñver kavnez un dalmerenn (sl. *dolichoméga-artère*).

méga-uretère ◇ **megaureter, megaloureter** ◇ **usvoll san droazh, sandroazhusvoll** g. Bolc'hadur ganedigel ar san droazh, diwar angwe ar c'haherwiennoù levn, kevret alies gant al lestrusvoll hag en ervez da zec'han ul lounezhfoeñv.

mégabassiné ◇ **congenital dilatation of renal pelvis** ◇ **lestrusvoll** g. Reñver kavnez ganedigel lestr al lounezh diwar angwe ar c'haherwiennoù levn, en ervez da zec'han ul lounezhfoeñv (sl. *méga-uretère*).

mégabulbe ◇ **dilatation of pyloric cap** ◇ **keurvougev** b. Usvoll mougev ar porzhier.

mégacalicose ◇ **megalycosis** ◇ **keurgaliregezh** b. Kammneuziad al lounezh naouus dre ur bolc'hadur muiek eus ar c'haliroù hag, a-geñver, un isvent eus pikermennoù al lounezh; reol e chom ar gaenenn hag al lestr.

mégacapillaire ◇ **enlarged capillary** ◇ **korrwazhied usvolle** Usvoll muiek ganedigel ar c'horrwazhied.

mégacaryoblastes ◇ **megacaryoblasts** ◇ **megakarioblast** s. Kelligoù bras (30 µm treuzkiz) pevarc'hornek, dezho ur protoplasm gwervanek bazennlen hag ur graoñell garrezek gant ur rouedad kromatin tuzum; bezant int er mel eskern, o teverañ eus an hemokitoblast hag o c'henele dre vitozioù klasel kelligoù merc'h 2n kromozom a c'han d'o zro dre anadennoù endomitoz megakarioblast 4n, 8n ha 16n kromozom, hag erfin megakariokit bazennlen (sl. *granulocyte : lignée* ~, *mégacaryocytes*).

mégacaryoblastose maligne ◇ **acute megakaryocytic leukaemia** ◇ **megakarioblastoz** g. **yud, leukemiezh** b. **megakariokitel lemm** Seurtad megakariokitoz yud o tedeñ evel ul leukemiezh lemm, naouus dre an neridigezh er mel eus megakarioblast yaouank anrizhek.

mégacaryocytaire ou **thrombocytaire : lignée** ou **série** ~ ◇ **thrombocytic series** ◇ **ac'had** g. **megakariokitel** pe **trombokitel** Heuliad ar c'helligoù yaouank o tisoc'h, goude emrannañ hag azviñ e mel an eskern, gant an trombokit (pe pladanoù ar gwad); anezho, adalek ar c'helligoù kezivik (pe bongelligoù) : an hemokitoblast, ar megakarioblast, ar megakariokit, an trombokit (sl. *myéloïdes : lignées* ~).

mégacaryocytes, cellules géantes de la moelle des os ◇ **megakaryocytes** ◇ **megakariokit** s., **keurgelligoù** l. (b.) **mel an eskern** Kelligoù bras (50-100 µm treuzkiz) bezant e mel an eskern, dezho ur graoñell vras c'hwezigennek, lieshoskek ha broñsek; deverañ a reont eus ar megakarioblast, tremen dre ar pazennoù bazennlen, greunek, trombokitogen, koll o c'hraoñelloù hag, a-benn ar fin, dastammañ e pladanoù (trombokit).

mégacaryocytopoïèse ◇ **megacaryocytopoiesis** ◇ **megakariokitparañ** Furmiñ ar megakariokit.

mégacaryocytose ◇ **megakariocytosis** ◇ **elvegakariokit** g. Reñver ar megakariokit e mel an eskern, er gwad amredat ha zoken en holl wiadoù (mieloziou megakariokitel); degouezhout a ra da neridigezh ar megakariokit bezañ anrizek ha dedreñ buan pe buanoc'h en un *e. yud* marvus (leukemiezh vegakariokitel) (sl. *thrombocytémie essentielle*).

mégacéphalie, **mégalocéphalie** ◇ **megacephalia** ◇ **klopennusvent** g. Usvent muiek ar c'hlopenn (bonan pe gleñvedel) (sl. *macrocéphalie*).

mégacôlon ◇ **megacolon** ◇ **usvoll kolon**, **kolonusvoll** g. Bolc'hadur en un darn hir pe hiroc'h eus ar vouzelenn vras, gant tevadur ar gahersae ha goustivadur pervers, dardennadur muiek a 'r c'hof, dassav ar mon; er bugelvezh kentañ e stader ar *k. ganedigel* (Gl. *m. congénital*) e dianlen anrevoud plezhadoù Meissner hag Auerbach er rannbarzh youlc'h-sigma; en oad gour e tarvez ar *k.* e dianlen un isvoll, un nervanaez, ur pistriadur, h.a. (sl. *dolichomégacôlon*).

mégadiaphragme ◇ **megadiaphragm** ◇ **kelc'hspereunusvent** g. Tanavadur hag askennadur ganedigel ar gelc'hspereunn, o kentuañ d'an torogadoù (sl. *éventration*).

mégadolicho-uretère, **dolichoméga-uretère** ◇ **mega and dolichoureter**, **dolichomegaureter** ◇ **ushed-usvoll san droazh**, **sandroazhushedusvoll** g. Reñver hirder ha kavnez ar san droazh, ganedigel pe dianlen d'ur skoilh war ar forzhioù troazhañ, en ervez da zec'han al lounezhoefñ.

mégaduodénum ◇ **megaduodenum** ◇ **usvoll daouzegenn**, **daouzegennusvoll** Bolc'hadur an daouzegenn.

mégalérithème épidémique, **cinquième maladie éruptive** ◇ **erythema infectiosum** ◇ **megalérite** g. **darreuziat**, **pep**, **kleñved dispuilhat**, **eritem** g. **poreel** Kleñved tredizhus darreuziat, eus stroll an terzhiennoù dispuilhat, kevredet peurliesañ ouzh un darreuziad ruzell pe ruzig, naouus dre un dispuilhad maelennoù o taskantañ e par an dremm, astennet d'an izili, hebiat d'ar c'hef, hep enantem, gant azonoù hollek leiek; devoudet e ve gant ur parvovirus (ar parvovirus B 19).

mégaloblastes ◇ **megaloblasts** ◇ **megaloblast** s. Kelligoù kraoñlek eus ac'had an hemati, bezant er rizehell pe e gouziviad kleñved Biermer; etreat int d'ar promegaloblast ha d'ar megalokit; anezho eritroblast naouus dre o ment vras ha finded rouedad kromatin o c'hraoñlek; *bazennlen* da gentañ (25 µm treuzkiz), ez eont da *lieslivuzennlen* (16 µm) ha da *drenkennlen* bep ma kresk feur an hemoglobin en o frotoplasm ha ma steuz o c'hraoñlek.

mégalocytaire : série ~ ◇ **megalocytic series** ◇ **ac'had megalokitel** Heuliad ar c'helligoù o revout er rizehell pe e gouziviad amwad Biermer, o tedreñ adalek ar bongelligoù betek kelligoù ruz a vent vras (megalokit), anezhañ ar promegaloblast, ar megaloblast hag ar megalokit.

mégalocytes ◇ **megalocytes** ◇ **megalokit** s. Kellig ruz keurel ouzhpenn 12 µm o zreuzkiz, o tont eus ar megaloblast bet deloezet o c'hraoñlek.

mégalocytose ◇ **megalocytosis** ◇ **megalokitoz** g. Bezañs megalokit er gwad (amwad yud uslivek) (sl. *anémie hyperchrome*).

1 2 mégalomanie **3 4 mégalomaniaque** ◇ **1 2 megalomaniac** **3 4 megalomaniac**, **megalomaniacal**, **megalomaniac** ◇ **1 meurvreat** aa. **2 meurvread** g. **-ed** **3 meurvreadek** aa. **4 meurvreadel** aa. 1 Gant ar veurvreadezh. 2 Gouziviad ar veurvreadezh. 3 A natur gant ar veurvreadezh. 4 A-zave d'ar veurvreadezh.

mégalomanie ◇ **megalomania** ◇ **meurvreadezh** b. Ambredadur reñverek en deus un den eus e c'halloud pe e gefload, tued o vont eus dreistprijadur e varregezhioù beziat betek an ambren a veurdad pa vez lodek e haeradennoù en un dezeverezh antraek (sl. *délire*).

mégalophtalmie ◇ **megalophtalmos** ◇ **keurlagadegzh** Ezreolder ganedigel al lagad o c'hoarvezout eus muiadur treuzkizoù al lagad, eus treuzkiz ar gornsae pergen.

mégaoesophage ◇ **megaesophagus** ◇ **usvoll treizher**, **treizherusvoll** g. Bolc'hadur an treizher, gwech ganedigel, gwech e dianlen un andag eus gwask krec'h ar stomok (sl. *cardiospasmie*).

mégasigmoïde ◇ **measigmoid** ◇ **usvoll sigma**, **sigmausvoll** g. Bolc'hadur ha hiradur ar c'holon sigma.

mégasplanchnie ◇ **splanchnomegaly** ◇ **keurflugezegezh** b. Kresk ec'honad ar flugez; anv a reer eus *k. koazhadel* (*m. digestive*) pa vez bolc'het ar ganol vezhur (en he fezh pe en he hanrannoù: *treizherusvoll*, *kreuzusvoll*, *daouzegennusvoll*, *kolonusvoll*).

mégathrombocytes ◇ **megathrombocytes** ◇ **megatrombokit** s. Pladanoù gwad yaouank a vent vras.

meibomiite ◇ **meibomitis** ◇ **meibomiusfo** g. Tanienn gwagrennoù an tarsoù (TA *glandulae tarsales*, anvet diagent *gwagrennoù Meibomius*) loet e-barzh *tars ar valvenn* (TA *tarsus palpebrae*) lavnenn stirek bezant er malvennoù.

Meigs : syndrome de ~ ◇ **Meigs syndrome** ◇ **azoniad Meigs** Torliñv ha bruskdourad kevret gant ur yoc'henn guñv a 'r vizez (fibrom peurliesañ), o steuziañ goude an ezvenadenn anezhi.

méiose, **division réductrice** ◇ **meiosis** ◇ **meioz** g., **emrannañ direüs** Emrannañ naouus d'ar gametoù (vigellig ha spergellig), anezhañ dispartiañ an div elfenn a ra pep hini eus an *n* re gromozomou (gant an den, 22 re gromozomou somatek pe *ootozomou* hag 1 re gromozomou revel pe *gonozomou*); pep hini eus an div elfenn o tegouezhout gant ur gellig-verc'h, ez endalc'h enta kraoñlek per gamet *n* kromozom distag (sl. *mitose*, *ovogenèse*, *prophase*, *réduction des chromosomes*, *spermatogenèse*).

Meissner : corpuscule de ~ ◇ **Meissner's corpuscule** ◇ **korfig Meissner** Korfig bolc'hennet loet e begennoù an derm, anezhañ fraouva ar stekiñ.

melæna, **méléna** ◇ **melaena** ◇ **melena** g. Karzhadur dre ar fraezh eus gwad du mesket pe get gant oulennoù, warnañ neuz ar c'houltron peurliesañ.

mélagie ◇ **melalgia** ◇ **ezelost** b. Laur en izili, en izili traoñ dreist holl.

mélancolie ◇ **melancholy**, **melancholia** ◇ **melankoliezh** b. Gouvid oc'h amparañ prantad isnoael ar psikoz daouvleinek, naouus dre ul laur askre grizias, un heudadur bredloc'hadel, kantaezadoù dic'hoanag, ambrenoù a gablusted, a andellid, a zaonedigezh, a emgasoni; parennoù hêrezhel a lakaer war wel ent stadedeg evit da wikefreoù hilel ar c'hleñved menel andigej evit c'hoazh; un trummad eo ar gwaskad melankoliezh ha, da barraat ouzh ar riskl emlazh, e ranker alies arloañ ur steudad tredangridañ war un dro gant sankadurioù enepgouvideier, ar remañ o vezañ diouezet da c'houde dre ar genoù e-doug mizvezhioù; ur furm all a velankoliezh eo ar *gouvid atreñ* o tarvezout goude an oad a 50 vloaz (sl. *antidépresseur*, *cyclothymie*, *délire*, *dépression*, *dépression d'involution*, *douleur morale*, *électrochoc*, *humeur 2*, *hypothyrie*¹, *inhibition*, *manie*).

mélancolique ◇ **melancholic**, **melancholical** ◇ **1 melankolek** aa. **2 melankoleg** g. -eion **3 melankolek** 1 O c'houzañv ar velankoliezh. 2 Gouziviad ar velankoliezh. 3 A-zave d'ar velankoliezh.

mélanhidrose, **mélanidrose** ◇ **melanidrosis** ◇ **c'hwezduegezh** b. Seurtad c'hwezlivegezh naouus dre livezh du ar c'hwez (sl. *chromhidrose*).

mélanine ◇ **melanin** ◇ **melanin** g. Livegenn teñval he arne, adalek an du betek ar gell arrous, o revout e meur a lec'h er bevedeg, ent reol (tolgennsae, kroc'hen ma sav e feur dre wered ar skinoù dreistmouk, h.a.) hag, ent kleñvedel, e-barzh yoc'hennoù adanvet *melanek*.

mélanique ◇ **melanotic** ◇ **melanek** aa. A-zivout gwiadoù ensilet outo livegennoù du, sk. : *karkinom melanek* (Gl. *carcinome mélanique*), seurtad karkinom rouez.

mélanisme ◇ **melanism** ◇ **melangezh** b. Neuz a 'r c'hroc'hen, gantañ ul livegad teñval doues pe douesoc'h, strewek hag a-wechoù hollek, stadet e kleñvedoù 'zo (sl. *Addison* : *maladie d'~*, *diabète bronzé*, *mélanodermie*).

mélanoblastose neurocutanée ◇ **neurocutaneous melanosis** ◇ **melanoz** g. pe **melanoblastoz** g. **nervgroc'hene**l Anaer naouus dre gevreted *nevuzioù* (a-wechoù paoterek, livegennek, gwenaenec ha blevek) ha *strafuilhoù nervel* liesseurt (empennfoeñv ar vagadell, klopennad, seizioù, direizhoù ilpennek, azonoù ur yoc'henn empenn) dec'hanet gant *ezreolderioù livegennek ar pilhon* (tiennoù, ensiladur strewek o vont betek engronnañ ar mel a-livenn hag orin an nervednoù, yoc'hennoù a-wechoù yud).

mélanocytes, **chromatophores** ◇ **melanocytes** ◇ **melanokit** s. Kelligoù steredennek evodet eus ar gribenn arc'hnerveg, o parañ livegenn velanek, bezant en epiderm hag e derm rannbarzh ar groazell (tienn vongolek), el luc'hsae, en dolgennsae hag er pilhon.

mélanodermie ◇ **melanoderma** ◇ **melanoderma** g. Livezh teñval ar c'hroc'hen diwar ensiladur paoterek ul livegenn, ar melanin peurliesañ, e gwelad don an epiderm (sl. *mélanisme*); *melanoderma ar gantreerion* (Gl. *mélanodermie des vagabonds*) a reer eus stad kroc'hen hiniennoù erialet gant al laou, anezhi, war barzhioù krec'h ar c'horf pergen, ul livegad a neuz brikkailhet dre an ekzimatekaat hag al likenekaat, rizennoù skrabañ ha kleizennoù lingroc'henfo teñval pe dislivet.

mélanodontie infantile, **amélogénèse imparfaite** ◇ **amelogenesis imperfecta** ◇ **dentduegezh** b. ar **vugale**, **amailhispar** g. Anaer o tizhout an dent hegouezh hepken, anezhañ distruj an amailh war un tachad bras pe vrasoc'h, oc'h arwelaat an dentin a ya gell arzu; arzodet e vez d'an negezh vitamin C.

mélanogénèse ◇ **melanogenesis** ◇ **melaninbarañ** Furmiñ ar melanin er gwiadoù adal an tirozin, kentraouet gant an adrenalin, ar skinoù dreistmouk ha, lakadenn kevarguzet, un hormon melaninwezher; diouerek eo ar melaninbarañ gant an albineion, reñverek e kleñved Addison hag er yoc'hennoù melanek (sl. *mélanotrope* : *hormone* ~).

mélanglossie ◇ **melanglossia** ◇ **teodduegezh** b. Livezh du kein an teod devoudet gant ur foue.

mélanome ◇ **melanoma** ◇ **melanom** g. Anvad rumm ar yoc'hennoù melanek pe livegennek; ar *m. kuñv* (Gl. *m. bénin*), anvad all an *nevuz livegat kuñv* (sl. *lentigine*); *m. yaouerel* (Gl. *mélanome juvénile*), anvad all *nevuz Spitz* (sl. *Spitz* : *naevus de* ~); ar *m. yud* (Gl. *m. malin*), anvad all an *nevokarkinom* (sl. *naevocarcinome*); en *Destladur nevez* embannet e 1994 gant ar *Société française de dermatologie* (Kevredad frañsez ar Groc'henouriezh), e teanver *melanom* ar yoc'hennoù melanokitel yud ha *nevuz* ar yoc'hennoù melanokitel kuñv.

mélanome de Dubreuilh ◇ ◇ **melanom Dubreuilh** (termen kinniget e 1994 gant *Kevredad frañsez ar Groc'henouriezh* en erlec'h ouzh *mélanose circonscrite précancéreuse de Dubreuilh* pe *lentigo malin*, Br. *melanoz kantet rakkankrek Dubreuilh* pe *lentigo yud*) anaf an henad o tinoñ ent hanbarek war an divvoc'h, ar malvennoù, an tal e rezh tiennoù gell pe du a vent gant ur penn spilhenn, o kreskiñ buan hag o stabilaat, en ervez da zedreñ e nevokarkinom.

mélanonychie ◇ **melanonychia** ◇ **ivinduegezh** b. Neuz arzu an ivin diwar ensiladur ar melanin.

mélanoptysie ◇ **melanoptysis** ◇ **duskopañ**, **duskopad** g. Skrouediañ danvezioù du, azon an antrakoz gant mengleuzerion ar glau, da geñver boukadur tolzadoù yoc'hennec o skevent.

mélanosarcome, **sarcome mélanique**, **chromatophorome** ◇ **melanosarkoma** ◇ **melanosarkom** g., **sarkom melanek**, **kromatarform** g. Yoc'henn yud kenan evodet hogos bepred eus ar c'hroc'hen pe eus ar voull lagad, ganti holl zoareoù ur sarkom, diforc'h hepken dioutañ d'ar sell diglav pe d'ar c'horrgresker dre vezañ fonnek al livegenn velanek dasparzhet unvan pe unvanoc'h.

mélanose ◇ **melanosis** ◇ **melanoz** g. Termen bet luniet gant Laennec da zeanviñ ar yoc'hennoù melanek; hiziv e talvez da arouezñ ur yoc'hadurioù danvez du en ur gwiad, ha pa ve an kez danvez deuet eus an diavaez (antrakoz), pe furmet e-barzh an

organoù — er c'hemeradur-mañ diwezhañ koulskoude en en arverer dreist holl da verkañ hogennadur al livegennoù el lec'h-mañ lec'h eus ar bevedeg.

mélanosome ◇ **melanosome** ◇ **melanozom** g. Greunenn bezant e kitoplasm ar granulokit, oc'h enderc'hel ar melanin.

mélanotrope : **hormone** ~, **mélanotropine** ◇ **melanocytic stimulating hormone**, **MSH** ◇ **hormon** g. **melaninwezhher** Hormon oc'h usvollañ melanofor ar pesked, a ve borc'het en den gant ar rakgougorfenn, kentraouer ar melaninbarañ hag eneptraoshaet; e kevarguz emañ ar bezoud anezhañ (sl. *mélanogenèse*).

mélanurie ◇ **melanuria** ◇ **troazhduegezh** b. Bezañs livegenn du en troazh.

MELAS ◇ **MELAS** ◇ **MELAS** g. (Gwreskanv diwar Sz. *Mitochondrial myopathy; Encephalopathy; Lactic Acido-dosis and Stroke-like episodes*, [*kaherad mitokondriel, empennaoued, akidoz laktek ha resmiadoù orc'hadvanek*]) Seurtad empennaoued mitokondriel oc'h erzerc'hañ er vugeliezh dre zarvoudoù nervgwazhiedel trumm hag adfeilhus (ledc'houseizi, ledangwel), c'hweladoù, droukfell, envedi ha dedro d'ar marv dindan un nebeut bloavezhioù; a-gevret ez eus un akidoz laktek hag ezreolderioù mitokondriel.

mélasme ◇ **melasma** ◇ **melasma** g. Brizhennoù du a stader gant an henaded, war o divc'har pergen, anezho ul livrezh ezreol eus an epiderm heuliet gant un dispeliadur koc'haneh.

mélatonine ◇ **melatonin** ◇ **melatonin** g. Hormon borc'het gant ar c'hourjadenn, nebeut anavezet e wered evit c'hoazh; heudañ a rafe elloerennoù borc'hañ ar c'hougorfenn; seul baotoc'h eo ar borc'hañ anezhañ ma leia ar goulaouder; dasperzhiañ a rafe e strafuilhoù ar c'housked, en nijlank, ha zoken er c'hoshadur hag e dedro ar yoc'hennoù.

Méléda : **maladie de** ~ ◇ **Meleda disease** ◇ **kleñved Meleda** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, broreuziadek en enezenn Meleda (Dalmatia), naous dre gorrwazhiedusvoll kemparzhik an eizhaennoù gant hiperkeratoz ha c'hwezusvorc'h.

mélioidose ◇ **melioidosis** ◇ **melioidoz** g. Pore ar c'hrigner, kiriek dezhañ bazhell Witmore (*Pseudomonas* pe *Malleomyces*) kerentiet gant bazhell ar morm, o reuziañ e Gevred Azia, treuzkasadus d'an den dre an hent koazhadel pe endangroc'heneh; anaez kevarezet ha liesneuz kenan, oc'h erzerc'hañ gwech e rezh ur wadlestegzh lemm, tifek, gant darc'hoal, gwech dre ur stad wadlinlestel lazerius, gwech dre lec'hiadurioù skevent pe kroc'hen.

mélitine ◇ **melitin** ◇ **melitin** g. Danvezenn antigenek prientet dre azdodiñ silad un diñvadenn *Brucella meli-tensis* ouzh un aotolizad korfoù garvevel lazhet dre an alkool-eter, arveret da ren proud endermel Burnet (evit dinoñ ar velitokokiezh) (sl. *brucellose, intradermo-réaction*).

Melkerson-Rosenthal : **syndrome de** ~ ◇ **Melkerson-Rosenthal syndrome** ◇ **azoniad Melkerson-Rosenthal** Azoniad hêrezhel a-wechoù, o teraouiñ er vugeliezh hag o tedreiñ a-frapadoù, o kevredañ koeñvadur padek an dremm strewek pe lec'hiet en ur weuz pe en div, irviegezh an teod, seizi arreadek un-pe daoudou an dremm, war un dro gant klopennadoù, asikted, c'hwarnennoù ha tizhad an nervennoù a-glopenn (sl. *cheilite granulomateuse*).

mellite ◇ **mellitum** ◇ **melleizhenn** b. Siros ma 'z eus mel e-lec'h sukr.

méloplastie ◇ **meloplasty** ◇ **fasatelviñ** Dazluniañ ar fas dre unanatelviñ (sl. *autoplastie*).

mélothérapie, musicothérapie ◇ **musicotherapy** ◇ **songurañ** Prederiañ dre ar sonerezh, hentenn yac'hadurel arveret gant bredvezeion 'zo.

Melrose : **méthode de** ~ ◇ **Melrose's method** ◇ **hentenn Melrose** Arsav kalon padennek dewerc'het e-kerz ar gwezhoù surjaniel war ar galon digor gant amredad ezkorfel, dre ensinklañ en aortenn us-kornloarek un dileizhenn gitrat kaliom.

Meltzer : **signe de** ~ ◇ **Meltzer's sign** ◇ **arouez b. Meltzer** Laur lemm devoudet gant argezarad ar gigenn loan-klun kentre ma pouezer war boent McBurney, arouez an divilhennoh enek.

membrane cellulaire ou **plasmique, plasmalemm** ◇ **plasma membrane** ◇ **koc'henn b. ar gellig, plasmalemm** g. Golo en dro da zanvezenn ar gellig, anezhañ gwiskad daouek *fosfolipidoù* ensiket enno *proteinoù* koc'hennel a zo reoù anezho proteinoù dezougen (dezougen gouzañvat : *ionganoù*; dezougen oberiat : *porzherioù*); re all o vezañ *pakerioù* arhentoù ezkelligel; ar *glukid* koc'hennel (pe *glukokalikoù*) zo anezho glikolipidoù ha glikoproteinoù; gant ar *goc'henn* e vez un *dredanvleinegezh* (er paouez : leiel a-ziabarzh, muiel a-ziavaez) (sl. *canal ionique, pompe à protons, pompe à sodium, potentiel de membrane, protéines G, récepteur 2, stabilisateur de membrane*).

membranes hyalines : **maladie ou syndrome des** ~ ◇ **hyaline membrane disease** ◇ **kleñved pe azoniad al lienennoù gwervanek** Seurtad azoniad ankalez analadel (enanaladel pergen) an nevezc'hanidi, naous dre elanal, entenn us- hag is-klereh, argreskus afo, falladur ar galon dehou hag arouezioù nervel; goleet eo gorre an aerforzhioù hag al logigoù skevent gant lienennoù fibrinoïdel eozinofilek o tisoc'h moarvat eus daralladur ar gourlifr; en degouezhoù gwellañ e teloez al lienennoù hag e pare ar bugel a-benn 4 pe 5 devezh; pa drebodont avat en en kasont d'ar marv dindan 2 pe 3 devezh dre anoksiezh hag akidoz; azoniad a stader dreist holl gant ar rakkoulzeion bet ganet gant mammoù diabetek; gant an oadourion ivez e stader azoniad al lienennoù gwervanek, da geñver skevetaoù diseurt (viruzel, bakteriel, stirek pe dianlen da geuziadoù kimiek pe fizikel), ar skorted lounezh pe an oksigengurañ uhelvec'h (sl. *dé-tresse respiratoire du nouveau-né, détresse respiratoire de l'adulte, œdème pulmonaire lésionnel, poumon de choc*).

(-) **membran-**

- *angine couenneuse, pseudomembraneuse* gorank tonennek
- *angine ulcéromembra-neuse* gorank gouliezlienennek
- *antigène*

fixé sur la membrane cellulaire antigen lenet ouzh koc'henn ar c'helligoù • *antiseptique agissant par modification des membranes bactériennes* dilester o werediñ dre zaskemmañ koc'hennoù ar bakteri • *bétabloquant stabilisateur de membrane* betadolc'her aroustaler koc'henn • *canal musculomembraneux* kanol gaherliennek • *conduits membraneux* kanolioù liennek • *effacement progressif de la membrane cellulaire* steuzidigezh argammedek koc'henn ar gellig • *enzyme intramembranaire* enzim enkok'hennel • *examen du liquide amniotique à travers les membranes* arseliñ al liñvenn amnionel a-dreuz d'ar c'hennenoù • *fausse membrane, pseudomembrane* brizhliennek • *formation membranaire recouvrant l'acrosome du spermatozoïde* furmadur koc'hennel o kabellañ akrozom ar spergellig • *immunoglobulines de membrane* immunoglobulinou a-goc'henn • *masse de protoplasme entourée d'une membrane* tolzenn brotoplasm gronnet gant ur goc'henn • *membrane artificielle d'un organe prothétique* kennenn galvezadel un organosod • *membrane basale du follicule* diazkennenn ar volc'henn • *membrane basilaire* lavnenn diazpenn • *membrane conjonctive limitant une cavité close* kennenn gengenel o wiskañ ur gavenn gloz • *membrane d'osmose* kennenn drelezhñ • *membrane de Bowman* lavnenn vevennus arao • *membrane de Descemet* lavnenn vevennus adreñv, kennenn Descemet • *membrane du tympan* liennek an daboulin • *membrane des hématies* koc'henn ar hemati • *membrane externe de l'œuf* kennenn diavaez ar vi • *membrane fibreuse de l'œil* sae stirek pe stirsae ar voull lagad • *membrane intercostale* liennek etre-kostoù • *membrane interosseuse* liennek etreeskernel • *membrane nucléaire* koc'henn ar graoñell • *membrane primitive de l'embryon* kennenn gezivik ar rizhell • *membrane semi-perméable* kennenn handreuz • *membrane séreuse* levgenn • *membrane synoviale* irgenn • *membrane vasculaire* sae wazhiedek • *membranes hyalines* liennek gweranek • *mucomembraneux* glaourliennek • *osmose se produisant à travers des membranes vivantes* trelezhñ o c'hoarvezout adreuz d'ar c'hennenoù bev • *possédant un noyau dépourvu de membrane* dezho ur graoñell hep koc'henn • *récepteurs membranaires* buzerioù koc'hennel.

NOTENN : Lies rzh elfennoù a gaver dindan ar skritell Gl. *membrane*, alese niver ar c'hevatalioù brezhonek : *koc'henn* er Gelligouriezh, *liennek*, *lavnenn*, *sae* er Gorfadurezh, *kennenn* (ha *liennek*, *tonenn*) er sterioù bevedourel ha klinikel ; un arvez eus aozerezh argammedek ar geriadur eo hevelep dasparzh steradurel ; aesaet e vo e heuliañ gant reizhadurioù 'zo en errata.

membre ♦ **limb** ♦ **ezel g., izili** Unan eus pevar farzh daoudañvat eus ar c'horf ereet ouzh ar c'hef dre c'hourizoù, o c'hoarvezout eus peder hanrann kenvellet : an *ezel krec'h* (TA *membrum superius*) eus ar skoaz, ar vrec'h, an arvec'h hag an dorn, an *ezel traoñ* (TA *membrum inferius*) eus al lez, ar vorzhed, ar c'har hag an troad (sl. *ceinture pelvienne, ceinture scapulaire*).

membre fantôme, illusion des amputés ♦ **phantom limb** ♦ **ezel tasmant, kammzerc'h g. an ambideion** Buhezad en ervez da c'hoarvezout goude ambidadur un ezel : dec'havaellañ a ra an ambideg e ezel ezvezant e rezh anglevadoù stekiñ, gwrez, laur, h.a. (sl. *désafférentation : douleur de ~, extérioration, illusion*, La-11 415 hh.).

mémoire immunologique ♦ **immunological memory** ♦ **memor b. hangaeel** Galloud piaouet gant al limfokit B ha T da virot ha da zaskavout stlennadoù o deus lerc'hwezet da geñver keraez kentañ un antigen, alese an anvad *kelligoù memor* a lakaer warno ; da geñver ur c'heraez nevez a 'n antigen, en en naouaont ha, da heul, e neront hag e telankont erwezhoù hangaeañ spesadel ; termen arveret a-wechoù da arouezañ barregezh erwezhañ ur bevedeg a zo ennañ kelligoù memor (sl. *amnésie immunitaire, cellule-mémoire, facteur de transfert*).

mémoration ♦ **memory** ♦ **daskounañ** Degas d'an emouezañ stlenn bet enkounet (sl. *amnésie*).

Mende : syndrome de ~ ♦ **Mende's syndrome** ♦ **azoniad Mende** Azoniad ganedigele o kevredañ albinegezh darnel, bouzarded hag, a-wechoù, dremm downvanek, kammneuziadoù ar skouarn diavaez hag envezalliv.

Mendel : loi de ~ ♦ **Mendel's Laws** ♦ **savelennoù l. (b.) Mendel** Savelennoù diazez an Hiloniezh evit a sell treuzkas an doareennoù hêrezhel : 1) *savelenn an hanbarzhañ* (Gl. *loi de pureté des gamètes, Sz. law of segregation*) : da geñver argerzh ar gouennañ, ne vez ket mesket an doareennoù ; 2) *savelenn an drec'hegezh* (Gl. *loi de dominance, Sz. law of independant assortment*) : pa zoug an daou c'houenner pep a zoareenn gevarall ha pa zoug an holl c'houennidi unan eus an div zoareenn hepken, e reer eus houmañ un *doareenn drec'hek* (Gl. *caractère dominant*) hag eus eben un *doareenn enkilek* (Gl. *caractère récessif*) (sl. *dominance, dominant, récessif, récessivité*).

Mendelson : syndrome de ~ ♦ **Mendelson's syndrome, acute aspiration pneumonia** ♦ **azoniad Mendelson, skeventfo g. lemm dre zewentañ** Azoniad analadel diwar ruridigezh al liñvenn stomok e-barzh ar skoultrig briant-bronkez, peurliesañ e-kerz ar prantad tro-zieraeziñ pe da geñver un empennaoued pe ur c'homa, naouus dre ur poread hag ur goulivñ skevent lemm marvus a-herr en un daolenn a vleuz hag a falladur kalon.

Ménétrier : syndrome de ~ ♦ **azoniad Ménétrier** Gouliñv kalet en izili traoñ, e lodenn draoñ ar c'hof, e hanterenn gleiz ar bruska hag er vrec'h kleiz ; fennad melen-glein, gwadliñvek, pe a-wechoù sugennek er c'hrezoù hag en ampeleñ ; angludad ar gwerblennoù us-trebez kleiz ; taolenn glinikel e dianlen ur steviadur, kankrek peurliesañ, eus san ar bruska.

ménhidrose, ménidrose ♦ **menidrosis** ♦ **menidroz** C'hwezusorc'h o tarvezout da geñver ar mizioù.

Ménière : maladie ou syndrome de ~ ♦ **Ménière's disease** ♦ **kleñved pe azoniad Ménière** Gwaskadoù trumm trolern kevret gant boudinell ha bouzarded, o padout etre un nebeut eilennoù ha lies devezh, oc'h ameniñ e-doug entremezioù hir pe hiroc'h ; hervez an arbenn e tiforc'her : a) an *trolern-nerost* (Gl. *vertige-névrálgie*), arzodet da uswask liñvenn ar milendall (endourennoù tardenañ ar milendall liennek) ; b) an *trolern-nervennfo* (Gl. *vertige-névrite*), kevredet gant ur pilhonnervennfo, o tec'han ur vouzarded argreskus andireadus ; c) an *trolern kefel* (Gl. *vertige tronculaire*), e dianlen ur yoc'henn a 'r c'hogn pont-ilpenn (sl. *angle : syndrome de l'~*) pe ur c'hevridegennoù, kevret gant strafuilhoù nerval, gant bouzarded orc'hadek ha kouezhoù hep steuz ar ganskiant.

méningé : **syndrome** ~ ◇ **syndrome of meningeal irritation** ◇ **azoniad pilhonel pe tanailh ar pilhon** Teskad an azonoù oc'h erzerc'haat un tizhadur strewek eus ar pilhon : klopennad taer, dargrezañ ar c'hilpenn oc'h emastenn d'al livenn abezh, d'ar c'hof ha d'an izili traoñ, c'hweladoù, goustivadur; a-wechoù glizi, seizioù, uc'heraez kroc'hen, luc'hgaz; azoniad a stader e furmoù diseurt ar pilhonfo, er gwadliñvañ endan-gevnidek; un araez da spizañ stad al liñvenn benn-kein ha da heñchañ an deznaouiñ eo an ezvanañ a-loan.

méninges, TA meninges ◇ **meninges** ◇ **pilhon s.** An teir lienenn o c'hronañ an nerveg kreiz, a ziavaez da ziabarzh : ar *bilhonenn dev* (TA *dura mater*, Gl. *dure-mère, pachyméninge*), ar *gevnidegenn* (TA *arachnoidea*), ar *bilhonenn danav* (TA *pia mater*, Gl. *pie-mère*), teskad an div-mañ arouezet *pilhon youst* (Gl. *m. molles, leptoméninges*).

méningiomasose ◇ **meningiomasosis** ◇ **meningiomasoz g.** Kleñved naous dre zinodadur lies meningiom.

méningiome ◇ **meningioma** ◇ **meningiom g.** Yoc'henn guñv, arront pe viheñvel, oc'h evodiñ gorrek diwar gelligoù ar gevndegenn, oc'h amwaskañ ar gwiad nerval kefin; dibaot kenan gant ar vugale, stadet dreist holl en oadourion, merc'hed alies, goude 30 vloaz.

méningisme, pseudoméningite ◇ **meningism, pseudomeningitis** ◇ **gaoubilhonfo g.** Taolenn glinikenn ouzh he ober hogos holl arouezioù arc'hwelel ar pilhonfo lemm hep ma vez anafet ar pilhon, a stader dreist holl gant ar vugale hag ar rakkrennarded; peurliesañ a-geñver gant un arvevadezh pervezel (oksiur, askariz, tenia).

méningite ◇ **meningitis** ◇ **pilhonfo g.** Anvad genadel tanijennoù lemm pe henek pilhon an empenn pe ar mel a nep orin (poread garvel pe pistriadur), alese niver bras ar seurtadoù arbennel anezho : *p.* diwar bakteri lineiat (meningokok), *p.* a-geñver gant an dorzhellegezh, al leptospiroz, ar velitokokiezh, ar jotorell, ar blomegezh, an darheoliad, h.a.; da arouezioù boutin etrezo : an derzhienn hag ar strafuilhoù a ya d'ober an azoniad pilhonel (sl. **méningé** : **syndrome** ~).

méningite à liquide clair ◇ **aseptic meningitis** ◇ **pilhonfo anlestel** Seurtad pore, kuñv alies, diwar viruz peurliesañ, naous dre un azoniad pilhonel hag ul liñvenn benn-kein boull, ennañ leukokit en ur feur izel.

méningite cérébrospinale épidémique ◇ **epidemic cerebrospinal meningitis** ◇ **pilhonfo empennmelel darreuziad-ek** Pore darreuziadek diwar ar meningokok (eus ar stroll B e Breizh) o tizhout pilhon an empenn hag ar mel a-livenn, naous dre drummed an deroù, kreñvder an derzhienn ha feulster an erwezhoù pilhonel : dargrez ar c'hilpenn hag ar c'hein, arouez Kernig, alfo ha koma; herrek ha marvus e veze hogos bepred an dedro kent oadvezh ar bevastalerioù.

méningite lymphocytaire bénigne ou curable, sous-arachnoïdite aiguë curable des jeunes sujets ◇ **aseptic lymphocytic meningitis** ◇ **pilhonfo limfokitel kuñv pe anlestel pe kuradus** Anvad rumm oc'h erdalañ un niver a anaezioù a orinoù kevarall, boutin etrezo arouezioù tanailh pilhonel, dedro terzhiennel kuñv adfeilhus alies, daralladoù al liñvenn benn-kein (ellimfokit, albuminegezh leiek, ezvezañs hadennoù d'an ensellout eeun), anezho furmoù pilhonel al leptospirozioù, pilhonfoioù viruzel (kleñved Armstrong, pilhonfoioù jotorellel, senklel, erorel, furmoù 'zo eus an empennfo darreuziadek hag eus kleñved Heine-Medin), nervvrkelozioù er furm bilhonel ha furmoù 'zo a chom dianav o arbenn.

méningite séreuse ◇ **serous meningitis** ◇ **pilhonfo levrus** Tanijern c'houlemm pe henek ar pilhon youst hag ar c'havennoù endan-dev hag endan-gevnidek e par an empenn hag ar mel, gant uc'hec'honad al liñvenn benn-kein; *strewek* (*p. s.* hollel, kambrel pe empennfoeñvel) hag oc'h erzerc'hañ dre un azoniad uswask enklompennel, pe *lec'hiek* (*p. l.* kantet, kistel, araknitiz) da heul tilhennadurioù kloz pe klosoc'h, o wiskañ neuze furmoù klinikel liesneuz o tennañ da hini ar yoc'hennoù; devoudet e vez gant ur poread pe un daraez; alies ne zeznaouer ket e arbenn.

méningoblastome ◇ **meningoblastoma** ◇ **meningoblastom g.** Yoc'henn bilhonel amparet gant kelligoù an neuroglia en ervez da amwaskañ an empenn pe ar mel.

méningocèle ◇ **meningocele** ◇ **pilhonogad g.** Avelenn ar pilhon youst dre ur mizlid eus ar bilhonenn dev hag an askorn (klopenn pe mell kein) dezhi un droadenn strizh ha dall hogos bepred; reol e chom gwiadoù an nervahel ha reol ivez kelligoù amwiskad an ogad.

méningococcémie ou **méningococcie** ◇ **meningococcaemia** ◇ **meningokokemiezh b., meningokokiezh b.** Poreadur hollek dre ar meningokok, na endalc'h ket dre ret ur pilhonfo, erzerc'h dre un derzhienn uhel, arzostoù, un dispuilhad brizhennoù purpurek pe damroz ha bezañs meningokok er gwad; endalc'hok eo e ziskleriadur hervez lezennoù Frañs (sl. *purpura fulminans*).

méningocoques ◇ **meningococci** (u. : **meningococcus**) ◇ **meningokok s.** Spesad bakter, *Diplococcus intracellularis meningitidis*, eus ar genad *Neisseria*, diplokok kiriek da boreoù, peurgetket d'ar pilhonfo empennmelel darreuziadek; lies stroll anezho hep hangae kroaziet kenetrezo.

méningoencéphalite ◇ **meningoencephalitis** ◇ **pilhonempennfo g.** Tanijern an empenn hag ar pilhon anezhañ.

méningoencéphalocèle ◇ **meningoencephalocèle** ◇ **pilhonempennogad g.** Empennogad ennañ ur bogod a 'r gavenn endan-gevnidek (sl. *encéphalocèle*).

méningomyélite ◇ **meningomyelitis** ◇ **pilhonmelfo g.** Tanijern ar mel a-livenn hag ar goloennoù anezhañ, ar bilhonenn danav pergen.

méningopathie ◇ **meningopathy** ◇ **pilhonnaoued g.** Anvad genadel anaezioù ar pilhon.

méningoradiculite ◇ **meningoradiculitis** ◇ **pilhongwriziennfo g.** Tanijern ar gwrizennoù nerval, he orin er pilhon.

méningoradiculomyélite ◇ **meningomyeloradiculitis** ◇ **pilhonmelgwriziennfo g.** Tanijern diaser ar mel a-livenn, ar gwrizennoù a-livenn hag ar pilhon, o tarvezout a-wechoù e-kerz ar velitokokiezh; *p. argammedek* (Gl. *m. pro-gressive*) a reer eus ur

rouestlad a 'r pilhono empenmelel, naouus dre leiaat al loc'hañ, ar santout hag an damouezh en izili traoñ e dianlen dedroadur eilvedel ur skleroz eus ar mel hag ar gwrizennoù nerval.

ménigototropisme ◇ **meningotropism** ◇ **pilhonger'hañ, pilhonger'h** g. A-berzh danvezennoù kimiek pe gouennoù gervevion, tuadur da lenañ ent hanbarek ouzh ar pilhon.

méniscal ◇ **meniscal** ◇ **1** ~kreskenn, **kreskennel** aa. **2** ~disk, **disk-**, **diskel** aa. 1 A-zave d'ur greskenn genvellañ. 2 A-zave d'un disk kenvellañ (sl. *discal, discal* : *hernie ~e, hernie, ménisque*).

méniscectomie ◇ **meniscectomy** ◇ **kreskennezevenañ** Amzivenañ surjaniel hollel pe darnel ur greskenn genvellañ (sl. *ménisque*).

méniscite, méniscose ◇ **meniscitis** ◇ **kreskennanaez** g. Anvad genadel anaezioù ar c'hreskennoù kenvellañ (gouzisevellad henek, arzfo henek, anaf daraezel pe dic'henezhadel (sl. *discite, ménisque*).

méniscographie ◇ **meniscography** ◇ **kreskennluniñ** Skinluniñ kreskennoù ar glin goude ensinklañ aer pe un Xdemerenn e kavenn an arz.

méniscopexie ◇ **meniscopexy** ◇ **kreskennAanlenañ** Krafalañ tammoù ar greskenn genvellañ goude un daraez.

ménisque, TA meniscus ◇ **meniscus** ◇ **kreskenn** b. Furmader stirvigornek enarzel ar glin, dezhañ stumm ul loarbrim, tric'hornek e skej, englenet e drobarzh ouzh ar pour'had, e arc'hwel kefleuniañ ar c'heñver etre daou dalbenn kenvellañ amgenglot hag, e kenwered gant ar stagelloù, arzerc'hel stabiled ar c'henvell.

NOTENN : Gant aozerion 'zo e veze arveret La. *meniscus* evel anvad hollek ar furmadurioù stirvigornek bezant er c'henvelloù ; gant an destladur TA e reer *meniscus lateralis* ha *meniscus medialis (articulationis genus)* eus kreskennoù ar glin hep mui, ha *discus* eus furmadurioù stirvigornek un niver kenvelloù ma arvered *meniscus* diagent : *discus articularis articulationis acromioclavicularis, d. a. a. radioulnaris distalis...* ha *discus intervertebralis* (boaziet endeo, evit d'an adanv Gl.Sz. *meniscal* bezañ bet arveret war-vechoù en e geñver).

ménisque : **signe du** ~ ◇ **meniscus sign** ◇ **arouez** b. **ar greskenn** Unan eus arvezioù skinourel kankr ar stomok en e zeroù, naouus dre un ervenn sklaer argevek ouzh ribl ar c'hreuz, oc'h amgaañ skeudenn an anaf en ur he dispartiañ diouzh skeudenn ar peb all eus ar stomok.

Menkes : **maladie de** ~, **maladie des cheveux en fil de fer** ◇ **kinky hair syndrome** ◇ **kleñved Menkes, azoniad ar blev nezet** Kleñved hêrezhel dibaot treuzkaset er mod enkilek reveret, oc'h anadiñ gant ar vabaned gourev hag ouzh o c'has d'ar marv a-raok o zrede bloaz, naouus, *ent klinikel*, dre un arvez dibarek eus ar blev (rouez, islivegat, gweet war o ahel), dre dizhadoù an empenn hag an ilpenn (istant, kahegridoù, morgoñv, dilerc'h bred don), dre an dallentez, ezreolderioù ar gwazhied (kildroennek, darvollek, gwadliñvek) hag an eskern, *ent vevoniel*, dre wadisvec'h ar c'houevr hag ar c'heruloplasmin (glikoprotein dezouger ar c'houevr).

ménopause ◇ **menopause** ◇ **paouez** g. **mizioù** Dibenn an arc'hwel miziaouel o tarvezout e-tro 50 vloaz, anezhañ astal gwezhañ ar virez hag argiz an arouezioù revel, bouilhadoù tomm ha daskemmoù er c'hempouez enborc'hadel hag er bred (sl. *climatère, crise*).

ménorragie ◇ **menorrhagia** ◇ **mizwadliñv** g. Mizioù ezreol dre o reñver a-fet pad pe a-fet kementad (sl. *hyperménorrhée*).

ménorrhée ◇ **menorrhoea** ◇ **mizliñvañ, mizliñv** g. Berañ ar mizioù.

menstruation, menstrues, règles ◇ **menstruation, menses** ◇ **mizioù** l. Anadenn vonan gant ar vaouez en he hoal ganadel hag anvec'hiek, lodek en arc'hwel gouennañ, anezhi ar c'houezh diouzh ar grozh eus gwelead gorre an enkrozhenn hag ur beradur gwad o c'hoarvezout reoliek (dre ur c'hor a 25 da 31 deiz) hag o padout etre 4 ha 5 devezh ; astalet eo ar *m.* e-doug ar vrazedzed ha peurliesañ al laezhparañ.

menstruée, réglée ◇ **menstruating** ◇ **1** mizliñvek aa., **miziaouek** aa. **2** mizliñvus 1 A-zivout ur vaouez a vez o kaout mizioù, (er c'haozeeg : *amzeret*). 2 A-zivout ur vaouez a zo gant he mizioù (er c'haozeeg : *gant he amzerioù*).

menstruel ◇ **menstrual** ◇ **miziaouel** g., **mizliñvel** aa. A-zave d'ar mizioù, sk. : *kollgenn miziaouel* (sl. *caduque menstruelle*).

menstruel : **cycle** ~ ◇ **menstrual cycle** ◇ **kor** g. **miziaouel** Kemalad trovezhiek anadennoù bevedourel (hormonel, gwiadell) piaouel d'ar vaouez adalek ar gaezoueregezh betek ar paouez mizioù e-maez ar prantadoù bec'hiegi, angorzhet gantañ ar rakgou-gorfenn, ar vizezioù, an enkrozhenn, gwagrennoù gouzoug ar grozh hag ar gouin ; tri lankad a ya d'ober ar c'hor miziaouel : *1) al lankad folliculinael pe neradel*, adalek fin ar mizioù betek ar vic'hadiñ, ma tec'h an ar gonadostimulin A azvidigezh bolc'henn De Graaf, neridigezh kelligoù an enkrozhenn ha muiadur ar borc'hañ estradiol, *2) al lankad folliculolulineel pe ragenneizhiadel*, betek distro ar mizioù pe derou ar vec'hiegi, ma c'hoarvez, dindan delanvad ar gonadostimulin B, ar vic'hadiñ ha parañ ar c'horf melen, distrofurmiñ rakvec'hiegi an enkrozhenn ha borc'hañ kevret estradiol ha progesteron, *3) ma ne vez ket frouezhiget ar vi, al lankad mizliñvel*, ar mizioù (sl. *anæstrus, follicule de De Graaf, gonado-stimuline, nidation, œstral* : *cycle* ~, *æstradiol, progéstrone*).

mentagre ◇ **mentagre** ◇ **mentagr** g. Seurtad bolc'hennfo blevel kantet en elgezh.

mental ◇ **mental** ◇ **1** ~meiz, **meizel** aa. **2** ~bred, **bredel** aa. 1 (Ent strizh) a-zave d'an arc'hwelioù kefredel, a gementader diwar-bouez prouadoù sk. : an *oad meiz* (sl. *âge mental, quotient intellectuel, test*). 2 (Diarsell bloc'hel) a-zave da arvezioù kefredel, kantaazel, neuzidel ar realezh (sk. : *kleñved bred*, Gl. *maladie mentale*).

mentisme ◇ **mentism** ◇ **derc'hata** Anadenn eus maezienn an emouezañ, anezhi ambredañ ur strummad andiarvenn ha diharzadus a zerc'hadoù (mennoziou, envorennoù, geriennou, skeudennou), o c'hoarvezout er stadoù skuizhnez, enkrez, anhun, er predoù enhunel ha ec'hunel pergen, anavezet gant ar gouziviad an ezreolled anezho; aozerion 'zo a ra eus an derc'hata ur stad deroù eus an trezerc'hañ, a un gwikefre gant an darc'hwelerezh bred (sl. *automatisme mental, conscience, hallucination*).

méphitisme ◇ **mephitis** ◇ **mefitiz** g. Linkradur an aer gant aezhennoù mouezhus pe gant gwezuzennoù en araez da argevezañ ar bevedeg.

méralgie parsthésique ◇ **meralgia paraesthetica** ◇ **morzhedost b. kammeraezek** Strafulhoù an eraeziñ stokadel hag emanglevadel ha laurioù e tiriad nervenn groc'hen kostezel ar vorzhed, diasket alies gant al loadur war sav hirbad pe ar c'herzhed hag o trebadout bloavezhioù a-wechoù; stad gouzañvder an nervenn a lakaer kiriek dezhi ur c'hleñved hollek (diabet, tifoid, tifuz), un nervanaez (tabez, envedi beluzel), un amwaskad mellennel, ar vec'hiegi, ar borrdre, seizi ur gigen, h.a.

mercure ◇ **mercury** ◇ **bevgargant** g. Elfenn gimiek a niverenn atom 80, arouez Hg; metal liñvel er gwrezverkoù ordinal; kemmesket gant metaloù all ez a d'ober *amalgamoù*, reoù anezho (dre ar staen pe an argant) o talvoud da simant en Dentouriezh (sl. *ciment dentaire*); diwarnañ e teu, dre gediañ, 1) an *halioù bevgargantus* (dre Hg⁺), ampistriek, evel ar c'halomel Hg₂Cl₂, a voe danvezet pell amzer evel lia spurjus, bestlec'holus hag enepsifilizek, 2) an *halioù bevgargantek* (dre Hg₂⁺), pistriek kenan, evel ar sec'hdarzhad dasskrign^H HgCl₂; tanavet tre, en o arverer evel dilesterioù galloudus, da skouer an oksikianidenn bevgargant pe ar [®]*mercurochrome*; danvezet e vez bepred an oksidennoù bevgargant el Lagadouriezh; ar *pistriadur bevgargantel lemm* a zevoud ul lounezhad pibellentremzel, ar *pistriadur henek* strafuilhoù navel, koazhadel ha kroc'henel (sl. *hydrargyrisme, stomatite*).

Merkel : **cellule** ou **disque de ~**, **TA meniscus tactus** ◇ **Merkel's corpuscle** ◇ **korfig** g. pe **kellig** b. **Merkel**, **kreskenn** b. **stekiñ** Dibenn navel koublet gant ur gellig epitel loet e gwelead don an epiderm, fraouva ar stekiñ skañv.

mérocine ◇ **merocrine** ◇ **pizhevorc'hat** aa. A-zivout ur wagrenn a zo ezvountet he borc'hadenn eus he c'helligoù hep ma koll protoplasm ar re-mañ e gevanded (sl. *apocrine, eccrine, holocrine*).

mérodiastolique ◇ **merodiastolic** ◇ **ranndiastolel** aa. A-zivout un anadenn (trouz, sourr, h.a.) na bad nemet un darn eus an diastol.

mérogonie ◇ **merogony** ◇ **merogoniezh** b. Digrakadur unan eus an daou bronukleüz eus ur vi frouezhiget a-raok ma tiorre (sl. *andromérogonie, gynomérogonie*).

mérosystolique ◇ **merosystolic** ◇ **rannistolel** aa. A-zivout un anadenn (trouz, sourr, h.a.) na bad nemet un darn eus ar sistol.

mérotomie ◇ **merotomy** ◇ **rannvenañ** Gwezh rannañ ur gellig etre daou pe lies tamm war-benn studiañ tonkad pep hini anezho : trebadout a ra al lodenn a zo enni ar graoñell hag adc'henezhañ ar gellig, endra zic'henezh al lodennoù all.

MERFF : **syndrome ~**, **syndrome de Fukuhara** ◇ **MERFF** ◇ **MERRF**, **azoniad Fukuhara** (Gwreskanv diwar Sz. *Myoclonus Epilepsy associated with Ragged Red Fibres*) seurtad empennoù mitondriell a orin hilel dibaot kenan (1/400 000 e revezusted) o kevredañ en un den yaouank un droukfell kahegridel, un ankedre ilpennel, un envedi hag ur c'hahernaoued gant neuz draihet ar gwiennou ruz (sl. *mitochondriales : maladies ~*).

mérycisme ◇ **merycismus** ◇ **daskreuiñ** Distreiñ d'ar genoù, emdarzh pe delanket, eus ar bouedoù a zo war goazhañ e-barzh ar stomok hag ar chaokat anezho en-dro.

mésangial ◇ **mesangial** ◇ **mezangiel** aa., **etrekorrwazhiedel** aa. A-zave d'ar mezangiom.

mésangium ◇ **mesangium** ◇ **mezangiom** g. Gwiad etrekorrwazhiedel e-barzh blouegoù al lounezh.

mésartérite ◇ **mesarteritis** ◇ **krennsaefo g. (talmerenn)** Tanijenn media an talmerennou.

mescaline ◇ **mescaline** ◇ **meskalin** g. Danvezenn drezerc'heiat douhennet eus ur c'haktuz mec'hikat, ar peyotl, bredvireüs.

mésencéphale, **TA mesencephalon** ◇ **mesencephalon** ◇ **krennempenn** g. Parzh strizh eus an empenn loet dreist ar pont, anezhañ troadoù an empenn (TA *pedunculi cerebri*), troadoù uhelañ an ilpenn (TA *pedunculi cerebella-res superiores*) hag an turumelloù (TA *colliculi*); treuzet eo gant dourbont ar c'hrennempenn (TA *aqueductus mesencephali*).

mésencéphalo-sous-thalamiques : syndromes ~ ◇ ◇ **azoniadoù krennempenniderc'hvel** Azoniadoù diwar dizhad ar c'hrennempenn hag ar c'hreizennou navel iderc'hvel, anezho a-eiltu d'an anaf : ul ledazoniad ilpennel, ul ledazoniad ampikernennek hag, a-wechoù, ul ledaneraez, ul ledseizi, ur migevaot hag azonoù lagadel (talvoudus evit delec'hiañ an anaf).

NOTENN : Amgwer eo an termenou Gl. *hémiplégie cérébelleuse*, Sz. *cerebellar hemiplegia*, rak endra gaver ar ster "seizi" gant an holl arverioù all eus Gl. *plégie*, Sz. *-plegia* ez eus amañ anv eus divigoù lodek an holl anezho en azoniad ilpennel : treuzkorzhad, ledankedal, miaen, andasfiñv, h.a.; dre ober gant Br. *ledazoniad ilpennel* e heulian an aozerion c'hallek, bihanniverek evit c'hoazh, a ginnig erlec'hiañ *hémisyndrome cérébelleux* ouzh *hémiplégie céré-belleuse* (sl. *syndrome cérébelleux*).

mésenchymatose ◇ **mezenkimatoz** g. Dic'henezhadur ar gwiadou deveret eus ar mezenkim.

mésenchyme ◇ **mesenchyma** ◇ **mezenkim** g. Gwiad rihzellet o c'hoarvezout eus mezoblast hag elfennoù o tont eus kribenn an arc'hnerveg, tonket da ziforc'hekaat e gwiad kenglenel, migornel, askornel, endotelel, kahelel, h.a.

mésenchyme : **maladie du ~**, **mésenchymopathie** ◇ **disease of the mesenchyma** ◇ **kleñved a 'r mezenkim, mezenkimnaoued** g. Ergraf nozologek ledanoc'h eget kleñved ar c'hollagen (sl. *maladie du collagène*), oc'h erdalañ an holl anaezioù ma tasperzh erwezhoù difenn ar gwiad kenglenel hag ar reizhiad retikuloendotelel.

mésenchymome ◇ **mesenchymoma** ◇ **mezenkimom** g. Yoc'henn, kuñv peurliesañ, evodet diouzh ar gwiadoù deveret eus ar mezenkim.

mésentère ◇ **mesentery** ◇ **kandedenn** b. Aspleg eus an ampeleñn o keneren ar yunegenn-klunegenn ouzh ar speur, endalc'h het ennañ *talmerenn* ha *gwazhienn uhelañ ar gandedenn* (TA *arteria & vena mesenterica superior*) hag o barroù pennañ; ar *gandedenn voutin agein* (TA *mesenterium dorsale commune*) zo anezhi lodenn eus kandedenn agein ar rizhell a-geñver gant kilbleg an arc'hpervez.

mésentère commun : **persistance du ~**, **mesenterium commune** ◇ **patent common mesentery**, **mesenterium commune** ◇ **dreistpad ar gandedenn voutin**, **mesenterium commune** Kammneuziad naouus dre vezañs ur gandedenn voutin etre ar vouzellenn voan hag ar c'holon, loet diouzh un dalenn a-dreuz, e dianlen diouer ar c'hwelañ eus kilbleg an arc'hpervez hag ar c'hempegañ eus ar c'holon ouzh an ampeleñn adreñv; dre se, emañ loet ar vouzellenn voan a-bezh e tu kleiz ar c'hof ha disvountet ar c'holon d'an tu dehou, ezreolder o kentuañ d'an antreizh pervez dre gandedenn dag pe dre volvuluz.

mésentérique supérieure : **syndrome de l'artère ~**, **syndrome de la pince mésentérique** ◇ ◇ **azoniad talmerenn uhelañ ar gandedenn**, **azoniad ar gandedenn dag** Amwaskad trede lodenn an daouzegenn etre talmerenn uhelañ ar gandedenn hag an aortenn, dezhañ arbennoù ganedigel pe arzeuat, naouus dre erzerc'hadoù lemm (usvoll grezvarrek an argreuzenn gant c'hweladoù) pe goulemm (kofostoù uhel, heugennoù), azonoù amenet gant ar gourvez a-gof.

mésentérite ◇ **mesenteritis** ◇ **kandedennfo** g. Tanijenn ar gandedenn; ur seurtad anezhañ, ar *k. kurzhidik* (Gl. *m. rétractile*), anaez dibaot, dianav e arbenñ, a c'hoarvez eus angrizad lec'hiek pe strewek ar gandedenn, en ervez da zevoudañ un antreizh pervez.

més-, TA **meso-**, **meso** ◇ **meso-** ◇ **rouedenn** b. Aspleg eus an ampeleñn o keneren un organ ouzh ar speur, endalc'h het ennañ nervennoù ha gwazhiad an organ, sk. : *rouedenn ar c'holon* (TA *mesocolon*), *rouedenn ar vitez* (TA *mesovarium*).

NOTENN : Un nemedenn a chom en destladur TA : *mesenterium* ne intenter ket evel *meso-* + **enteron* (Br. *rouedenn ar pervez*), met evel *rouedenn ar yunegenn-klunegenn* (Br. *kandedenn*).

mésocardie ◇ **mesocardium** ◇ **mezokard** g. Rouedenn rizhellel ar galon.

mésocardie ◇ **mesocardia** ◇ **gouwariadur g. ar galon** Ezreolder ganedigel lec'hhiadur ar galon, etreat d'al loadur reol ha d'an dehouwariadur hep tuginadur kavennoù ar galon, kern ar galon o vezañ durc'haet war raok pe troet un disterig a-zehou.

mésoderme ◇ **mesoderm** ◇ **mezoderm** Feilhenn grenn ar blastoderm a yelo da amparañ ar gwiaid gouskor, ar c'higennoù, an organoù genel-troazhañ, ar reizhiad kalongwazhiadel, ar gwad hag epitelienn kavenn ar c'helom.

mésodermose ◇ **mesodermopathy** ◇ **mezodermnaoued** g. Anaez o tizhout ent hanbarek ar gwiadoù o tont eus ar mezoderm.

mésodiastole ◇ **mesodiastole** ◇ **kreiz-diastol** Ampoent kreiz an diastolvezh.

mésodiastolique ◇ **mesodiastolic** ◇ **~kreiz-diastol**, **kreizdiastolel** aa. A-zivout un anadenn o tarvezout en ampoent kreiz an diastol.

mésoduodénite ◇ **mesoduodenitis** ◇ **daouzegennrouedennfo** g. Tanijenn rouedenn an daouzegenn.

mésognathie ◇ **mesognathy** ◇ **hec'havedegezh** b. Mentoù ar c'haved a-gengann gant mentoù ar c'hloppenn hag ar fas.

mésomélique ◇ **mesomelic** ◇ **trederannel** aa. A-zivout trede hanrann an izili, eleze an arvec'h pe ar c'har (sl. *nanisme*).

mésomètre, **mésométrium** ◇ **mesometrium** ◇ **rouedenn ar grozh** Parzh eus *stagell ledan ar grozh* (sl. *ligament large de l'utérus*).

mésonephros, **corps de Wolff**, TA **mesonephros** ◇ **mesonephros** ◇ **mezonefroz** g. Lounezh rizhellel, etre ar pronefroz hag ar metanefroz, benvegad degorzhañ, anezhañ ur ganol dastum o tibennañ er c'hwezhigell hag o tifourkañ ennañ un niver pibelloù o tont eus bloueigoù; diwarnañ e tevero un argell, ar san sper hag ar c'hellennoù sper.

mésopique ou **crépusculaire** : **vision ~** ◇ **mesopic vision** ◇ **gweled g. issked pe mezopek** Aoz ar gweled pa vez izel ar gouloù; e hevelep amveziad ez eo al liv glas a vez merzhet ar gwellañ (sl. *photopique*, *scotopique*).

mésoprosope ◇ **mesoprosopic** ◇ **1 etrefasek** aa. **2 faskehedek** aa. A-zivout un den a zo ken ledan ha ken uhel he fas : 1 keal denoniel, 2 keal mezegel.

NOTENN : Anv zo amañ eus mentoù keñverek parzhioù ar c'horf e diarsell an Denoniezh hag ar Vezekniezh; notomp ne laka ar yezh etrevroadel kemm ebet etre an div ziskiblezh : Et. *brachy-* berroc'h eget keitat, *dolicho-* hiroc'h eget keitat, *meso-* etreat etre *brachy-* ha *dolicho-* (sk. : Gl. *brachycéphalie*, *dolichocéphalie*, *mésocéphalie*); kinnig a ran sevel pep a rumm termenou evit an div ziskiblezh : 1) gant ar rakgerioù Br. *krenn-*, *hir-*, *etre-* en termenou Denoniezh (sk. : *krennbennegezh*, *hirbennegezh*, *etrebennegezh*), 2) gant an destieroù (-)ished, (-)ushed, (i)kehed en termenou Mezekniezh (sk. : *ished kloppenn* pe *kloppennished*, *ushed kloppenn* pe *kloppennished*, *kehed kloppenn* pe *kloppenngehed*) (sl. *brachycéphalie*, *dolichocéphalie*).

mésosigmoidite ◇ **mesosigmoiditis** ◇ **sigmarouedennfo** g. Tanijenn rouedenn ar c'holon sigma, en ervez da zec'han ur skleroz, angrizadoù (s. *kurzhidik*, Gl. *m. rétractile*) hag anadennoù antreizh.

mésosystole ◇ **mesosystole** ◇ **kreiz-sistol** Ampoent kreiz ar sistolvezh.

mésosystolique ◇ **mesosystolic** ◇ **~kreiz-sistol**, **kreizsistolel** aa. A-zivout un anadenn o tarvezout en ampoent kreiz ar sistol.

mésothéliome ◇ **mesothelioma** ◇ **mezoteliom** g. Yoc'henn guñv pe yud evodet diouzh ar c'helligoù o pallennañ ar levr-gennoù (krezoù, ampeleñn, amgalonenn); *m. krezenel* (Gl. *m. pleural*), *endoteliom krezenel* pe *pleurom* a reer eus ur c'hank

kentael a 'r c'hrezoù evodet diouzh an endotelienn grezennel (pe mezotelienn), anaez dibaot naous ent klinikel dre ur fennad gwadliñvel adfeilhus ha laurus tre hag alies dre aloubidigezh an amgalonenn hag an ampeleñ, o tedeñ d'ar marv a-benn un nebeut mizioù; dre al luc'hengweliñ e stader war c'horre ar c'hrezoù torosennoù flamboezvanek (Gl. *mamelons framboisiformes*) dezverkus d'ar mezoteliom.

mésotélium, TA *mesothelium* ◇ **mesothelium** ◇ **mezotelienn** b. Endotelienn al lienenoù levrus (sl. *endothélium, épithélium*).

mésotérapie ◇ **mesotherapy** ◇ **mezoterapiezh** b. Hentenn yac'hadel o c'hoarvezout a ensinklañ korrzoenadoù ul lia (prokain, bevastaler, gwazhiedfrankaer, vitamin, vaksin, h.a.) e-barzh an derm dre araez ur stellad nadozioù munut, kalvezder ergemennet gant aozerion 'zo evit prederiañ ar behindoñv, ar remm, kleñvedoù poreel hag allergek ar forzhioù analañ, ar gernad, anaezioù ar gwazhied, h.a.

mesager : **second** ~ ◇ **second messenger** ◇ **eilvet kannad** g. Danvezenn enkelligel dilaosket da heul lenañ un hormon peptidek (kentañ kannad) ouzh e vuzer koc'hennel; arc'hwel an *e. k.* eo heudañ pe blivaat reizhiadoù enzimateg enkelligel 'zo.

messager-

- *acide ribonucléique messenger* (ARNm) trenkenn ribonukleek kannad (mRNA)
- *adresser un message* anvon ur giminiadezh
- *anomalie du message héréditaire* gwariadenn ar c'hemennad hêrezhel
- *déclencher la transcription de l'ARNmessenger* delankañ treuzskrivadur an RNA-kannad
- *message chiffré* kemennad rineget, rinegenn
- *message génétique* kemennad hilel
- *messenger génétique* kannad hilel
- *messenger électronique* anvonezh elektronek.

Mesulam : **syndrome de** ~ ◇ **Mesulam's syndrome** ◇ **azoniad Mesulam** Ankomz argammedek kentael o tedeñ war-du un envedi bluskennel dic'henezhadel nes da gleñvedoù Pick hag Alzheimer, hag eñ diforc'h hepken diouto ent neuziadurel dre un anteñv a 'r bluskenn muiek a-gleiz.

méta-analyse ◇ **metaanalysis** ◇ **tradezrannañ**, **tradezrann** g. Kendodiñ ent stadegel hag ent kementadel disoc'hoù an niver brasañ gwellañ a brouadoù yac'hadel war-benn savelañ tebegezh efedusted pep prederiadur (sl. *essai thérapeutique, MEDLARS, MEDLINE*).

méta-iode-benzylguanidine, **MIBG** ◇ **metaiodobenzylguanidine**, **MIBG** ◇ **metaiodobenzilguanidin**, **MIBG** Danvezenn nes dre he luniad d'an noradrenalin, arveret (goude tiellet gant ar skiniod ¹²³I) evit delec'hiañ ar feokromokitomoù dre skingannluniñ, arnodet ivez evit studiañ arc'hwel ar c'haheer kalon er c'halongheradoù.

métabolisme ◇ **metabolism** ◇ **kennevid** g. Teskad an daskemmadoù kimiek o c'hoarvezout er bevedeg da geñver pep hini eus e arc'hwelioù : arwerc'hañ ar gremm, furmiñ, trezerc'hel ha ratreañ ar gwiadoù, danzen danvezennoù arbennik (hormonoù, enzimoù, antikorfoù, h.a.); daou lankad argerzhioù a ziforc'her er c'hennevid hervez ma tennont d'an enaozañ : an *ennevid*, pe d'an ec'haozañ : an *eznevid* (sl. *anabolisme, catabolisme*).

métabolite ◇ **metabolite** ◇ **kennevidad** g. Nep danvezenn danzeet da geñver argerzhioù ar c'hennevid.

métacercaires ◇ **metacercariae** ◇ **metakerker** s. Furm enkistet eus ar c'herker.

métachromasie, **métachromatisme** ◇ **metachromasia** ◇ **arallneañ** Perzh gant elfennoù gwiadela da gemer un nead kevarall da hini al livuzenn arveret; a-geveneb, e reer *arunneañ* (Gl. *orthochromasie*) eus perzh ar gwiadoù da wiskañ nead al livuzenn.

métachromatique ◇ **metachromatic** ◇ **arallneat** aa. A-zivout an elfennoù gwiaedel o kemer un nead kevarall da hini al livuzenn; en dro gevenep, e reer anv eus elfennoù *arunneat* (Gl. *orthochromatique*).

métachromatisme ◇ **metachromatism** ◇ **dazneañ** Daskemmañ liv ar c'hroc'hen hag ar blev dre zelanvad an oad pe ar c'hleñvedoù.

métachronose ◇ **metachronosis** ◇ **dazleiapadiñ** Daskemmañ leiapad (peurliesañ dre verraat); *dazleiapadiñ isurzhañ* (Gl. *métachronose de subordination*) a reer eus argemmañ leiapad ar stelloù nerval dindan wered kreizennoù nerval uheloc'h; anadenn houmañ a rofe da gompren an trec'haolerezh a zaskemmfed dizehan treug an nervlanv etre an neuronenoù da geñver kenurzhierzh ar fñvoù.

métacritique ◇ **postcritical** ◇ **dianeizik** aa. A-zivout kement a c'hoarvez er prantad goude eizigenn ur c'hleñved (sl. *crise 1*).

métagénésique ◇ ◇ **goudefrouezhigiñ** : **1** — aa. **2** — g. 1 O c'hoarvezout da heul ar frouezhigiñ. 2 Prantad da heul ar frouezhigiñ.

métagéria ◇ **metageria** ◇ **metageria** Azoniad naous dre ur c'hoshaat rakkoulzat oc'h anadiñ ken abred hag ar c'hanedigezh (anteñv, livegadur ha korrwazhiedusvoll ar c'hroc'hen, blev rouez, diabet hag aterom an talmerennoù o tedeñ kentrat) ha dre un diorreadur savderel reol (sl. *géodermie, progéria*).

métalliques : **bruits** ~ ◇ **metallic sounds** ◇ **trouzoù l.** (g.) **metalek** Trouzoù merzhadus dre ar selaeuennañ, boutin etrezo un dasonn tregernus, a hañval dont eus ur gavenn dezhi speurioù metal.

métalloprotéase ◇ **metalloprotease**, **metalloendopeptidase** ◇ **metalloproteaz** g. Proteaz a zo ennañ un ion metalek (sulfur, houarn, zink).

métallose ◇ **metallosis** ◇ **metallos** g. Uzadur ezreol un ensteud ha, d'e heul, strewidigezh bruzun metal er gwiadoù pell pe pelloc'h, sk. : *metallos al lez* en dro d'un osod.

- métallothérapie** ◇ **metallotherapy** ◇ **metalgurañ** Arver yac'hadel ar metaloù pe an halioù anezho; er vezekniezh hermezek, arloañ traezoù metal (gwalennoù, troioù-brec'h, h.a.) ouzh ar c'hroc'hen.
- métamérie** ◇ **metamerism** ◇ **metameregezh** b. Dasparzh kentael an arc'hlivenn (sl. *chorde*) hag ar gwiadoù etre hanrannoù o tisoc'h eus arreadur an un goustur luniadel anvet *metamer* (Gl. *métamère*), amparet, en holl vellkeineged, gant un daoudañv somitoù (sl. *somites*), un daoudañv eginennoù kangrenn (nemet er penn); ne drebard hevelep *metamerekaat* (Gl. *métamérisation*) nemet gant ar mellkeineged uhelañ ha diwarnañ e tiwan ar melkennoù.
- métamérie cutanée** ◇ **skin metamere** ◇ **metameregezh ar c'hroc'hen** Dasparzh gorre ar c'hroc'hen etre tiriadoù o klotañ gant pep a hanrann vel kezivik pe neurotom (sl. *neurotome*); korvoet e vez keal ar vetameregezh evit displegañ an anrizegezhioù a stader e dasparzhadur an anafoù kroc'hen a orin navel (aneraez, senkl, h.a.).
- métamorphosie** ◇ **metamorphopsia** ◇ **neuzviwel** g. Ezreolder gwelout an neuzioù, merzhet distummet.
- métamyélocytes** ◇ **metamyelocytes** ◇ **metamielokit** s. Mielokit a zo krog o c'hraoñell da hoskiñ, eleze war dreñ e granulokit oadour.
- métanéprine** ◇ **metanephrine** ◇ **metanefrin** g. Ec'haozad metoksilet diwar an adrenalín (*metanefrin*) hag an noradrenalín (*normetanefrin*) war dreñ e *trenkenn vanilmandelek* (Gl. *acide vanylmandé-lique*); korfoù a zezventer en troazh evit diurnat ar feokromokitom (sl. *catécholamines, phéochromocytome*).
- métaphase** ◇ **metaphase** ◇ **metafaz** g. Eil lankad eus emrannañ ar gellig, naouus dre zilec'hiadur ar c'hromozomoù hag o destaladur war an dalenn geheder (sl. *mitose*).
- métaphyse** ◇ **metaphysis** ◇ **ardalpenn** b. Lodenn loet etre talpenn ha treuzenn an eskern hir, enni ar migorn kevreañ (sl. *cartilage de conjugaison, diaphyse, épiphyse*).
- métaplasie, processus métaplasique** ◇ **metaplasia** ◇ **treweañ, trewe** g. Argerzh treuzfurmiñ ur gwiad diforc'hekaet en ur gwiad diforc'hekaet kevarall, reol en e luniad hag en e berzhioù, ezreol dre e lec'hiadur (sk. : treweañ askornel ur migorn).
- métartériole** ◇ **metarteriole** ◇ **talmeizhaenn** b. Tamm dibenn un dalmerennig o kenderc'hel gant ur gorrwazhiedenn.
- métastable** ◇ **metastable** ◇ **manstabil** aa. (Fizik) O hañvalout bezañ stabil, en ervez da zont d'ur stad stabiloc'h dre vezañ argridet; *stad vanstabil* (pe *izomerek*, Gl. *isomérique*) un derc'han a arouezer dre al lizherenn *m*, sk. : ^{99m}Tc pe teknetiom 99 m.
- métastase** ◇ **metastasis** (l. : **metastases**) ◇ **dassez** b. -ioù Tizhad eilvedel o tisoc'h eus treled dedaoladoù un anaf kentañ (ar *gentsez*, Gl. *foyer primitif*), o lenañ e lec'hioù all eus ar bevedeg, hag o tec'han anafoù a un furn gant hini ar gentsez; bez' e vez dassezioù a bep natur : garvevel, arvevadel, hanweel; er prezeg mezegel boutin avat e talvez an termen *dassez* hogos bepred da aroueziñ eil lec'hiadur ur yoc'henn yud da heul emdizh kelligoù kankrek dre hent ar gwazhied gwad pe limf; un dedro grevus eo dinod an dassezioù, hag int kenrat pe diwezhat, diskulius d'an deznaou a-wechoù, pa 'z int an arouez eus strewadur ar c'hankr, a-nes, rannbarzhel (e-barzh gwerblennoù an amdiriad), pe a-bell (er flugez, en eskern, h.a.); diwar an epiteliomoù dreist holl e c'hoarvez an dassezioù gwerblennel pa dreedont dre al limfforzhoù, endra dreed ar sarkomoù dre hent ar gwad peurliesañ; e dalc'h lec'hiadur ar gentsez ivez e vez hini an dassez : diwar gankr ar raksavenn da skouer e vez peurliesañ dassezioù en eskern, diwar gankr ar c'holon dassezioù en avu, diwar gankr ar stomok gant ar merc'hed dassezioù er vierrez.
- métastaser** ◇ ◇ **dassezañ** A-zivout un anaf, treledañ e rezh dassezioù.
- métastatique** ◇ **metastatic** ◇ **1 dassezek** aa. **2 dassezus** aa. **3 dassezal** aa. 1 Gant dassez, a natur gant an dassez. 2 A-zivout un anaf en ervez da zassezañ. 3 A-zave d'an dassez.
- métatarsalgie, pododynie** ◇ **metatarsalgia** ◇ **kreiztroadost** b. Laurioù o tarvezout er raog troad hag aliesoc'h er c'henvelloù kreiztroad-oeñsoù, lies arbenn dezho : kreiztroad fontet pe argeinek (flakadur bolz ar c'hreiztroad), troad kleuz gant kraban ar bizied, kraban ar bizied dre angrizañ dic'henezhadel ar stirenoù astenner, nevrom Morton (yoc'henn guñv bihan pe fibroz e lodenn araoù un nervenn etrekernel).
- métatarse, TA metatarsus** ◇ **metatarsus** ◇ **kreiztroad** g. Atel araoù bolz diahed an troad (TA *arcus pedis longitudinalis*, Gl. *voûte plantaire*), ouzh e ober eskern ar c'hreiztroad (TA *ossa metatarsalia*), loet etre ar souk (TA *tarsus*) en adreñv hag an oeñsoù (TA *phalanges*) en araoù.
- métatarsectomie** ◇ **metatarsectomy** ◇ **kreiztroadezvenañ** Lemel a-zarn eskern ar c'hreiztroad, da skouer evit derezhañ an troad kleuz, dazbidañ an diaz anezho.
- métathérapeutique** ◇ ◇ **dianguradel** aa. O tarvezout goude ur prederiadur.
- Métazoaires** ◇ **Metazoa** ◇ **Metazoed** (u. : **Metazoenn** b.) Er rummatadur kent e kevenbed daou rummad a yae d'ober riezad al Loened : ar Protozoed, loened unkellig, hag ar Metazoed, loened lieskellig; hiziv e strishaer ar Metazoed d'al Loened.
- métencéphale, TA metencephalon** ◇ **metencephalon** ◇ **ilempenn** g. Lodenn eus an dregempenn (TA *rhombencephalon*, Gl. *rhombencéphale, cer-veau postérieur*), anezhi ar pont hag an ilpenn.
- Métenier** : **signe de ~** ◇ ◇ **arouez** b. **Métenier** Aested ezriblañ ar valvenn grec'h, a stader en *azoniad Danlos*, mideñv hêrezhel ar mezenkim, naouus dre c'hourdastennegezh ar c'hroc'hen ha gourlaoskegezh ar c'henvelloù.
- météorisme** ◇ **meteorism** ◇ **gloen** b. Koeñvadur ar c'hof dre benn ur reñver aezhenn er pervez (sl. *ballonnement*).
- météorolabile** ◇ **meteorosensitive** ◇ **ebreizik** aa. A-zivout ar c'houziviaded kizidik ouzh argemmoù an ebradur (astmateion).

- météoropathie** ◇ **meteoropathy** ◇ **ebranaez** g. Anaez devoudet pe delanvadet gant an anadennoù ebradurel.
- météoropathologie** ◇ **meteoropathology** ◇ **ebranaezouriezh** b. Studi ar c'heñverioù etre ar gleñvedouriezh denel pe loenel hag an anadennoù ebradurel.
- météoropathologique : syndrome** ~ ◇ **meteoropathologic syndrome** ◇ **azoniad ebranaezel** Testkad ar strafuilhoù devoudet en den hag el loened gant an anadennoù ebradurel (avelioù sec'h ha tomm, korventenn, arnev, h.a.).
- météorotrope** ◇ **meteorotrope** ◇ **ebramzalc'hiat** aa. Dindan delanvad an amveziadoù ebradurel, sk. : *kernad e.* (Gl. *mi-graine m.*).
- météorotropisme** ◇ **meteorotropism** ◇ **ebramzalc'h** g. Delanvad an ebradur war ar yec'hed hag ar c'hleñvedoù.
- metformine** ◇ **metformin** ◇ **metformin** g. Biguanid glukozwadhevec'hius diounezet dre euvriñ (sl. *biguanide*).
- méthadone** ◇ **methadone** ◇ **metadon** g. Morfingeverel o lenañ ouzh ar morfinvuzerioù a rizh μ , diounezet evit dizonañ ar gaezhiaded.
- méthémalbumine** ◇ **methaemalbumin** ◇ **methemalbumin** g. Kemplezh diwar gediañ an hem gant albumin plasma ar gwad.
- méthémalbuminémie** ◇ **methaemalbuminaemia** ◇ **gwadvethemalbuminegezh** b., **methemalbuminegezh** b. Bezañs methemalbumin er gwad, stadet e-kerz ar gwadloezadoù bloc'hek, engwazhiedel dreist holl pe engwiad.
- méthémoglobine** ◇ **methaemoglobin** ◇ **methemoglobin** g. Livegenn c'hell deveret eus an hemoglobin a zo enni an houarn er stad teiramsavus, na zelen ket an oksigen; bezant en hemati reol er feur a 1 %.
- méthémoglobinémie** ◇ **methaemoglobinaemia** ◇ **gwadusvec'h** g. **methemoglobin** Feur reñverek methemoglobin e-barzh an hemati en ervez da zec'han azonou an angwent dre wadisvec'h oksigen : dulaz doues ar c'hroc'hen hag ar glaourgennoù hep elruz, enkreuz, trec'hwezh argrenn; kemm a lakaer etre : ar g. *arzeuat*, micherel peurvuiañ (dre zewentañ deveradoù nitret pe kloronitret ar c'harbidennoù benzenek, anilin, nitratou); ur g. *ganedigel*, treuzkaset er mod trec'hek.
- méthionine** ◇ **methionine** ◇ **metionin** g. Amindrenkenn alifatek sulfurin bevret, kedrann er protein ha pourchaser bonadoù metil; kavet e vez er vioù, er c'hazein, el laezh.
- métis** ◇ **1 half-bred** **2 half-breed** ◇ **1 hiron** aa . **2 hiron** g. **-ed** 1 Evodet eus paradur kerent a ouennadoù kevarall. 2 Hinienn hiron.
- NOTENN : Hiziv, ent skiantel, eo steuziet ar c'hemm lakaet etre “gouennadoù” e spesad an denion ha, war un dro, ar c'hemm etre ar c'healiou “hiron” (kerent a spesadoù kevarall, evel ar *mul*) ha “brizhouenn” (kerent a ouennadoù kevarall, evel ar *mulâtre*, ar *métis*, termenou gallek oc'h emplegañ bezoud ur “ouennad wenn”) (sl. *hybride*).
- Métopirone®** : **test à la** ~ ◇ **metryapone test** ◇ **prouad** g. **a 'r metirapon** Hentenn studiañ borc'herezh an hormon kaenwezher (ACTH) gant ar rakgougorfenn; gant ar *m.* e vez heudet, er gaenuslouezhenn, enaoz ar c'hortizol (pe hidrokortizon), dre se, ent reol, lakaet ar c'hougorfenn da vorc'hañ ur reñver ACTH ha, da heul, ar gaenuslouezhenn da zanken ur reñver kenaozad S Reichstein, diaraoger ar c'hortizol; dre zewentañ hemañ en troazh, e stader pe un dreistreñver anezhañ gant gouziviaded kleñved Cushing, pe, en eneb, reñver ebet pa vez skorted kentaer ar gaenusloun-ezhenn pe skorted ar rakgougorfenn (sl. *antéhypophyse*, *corticotrope* : *hor-mone* ~, *corticossurrénal* : *hormones* —es, *Cushing* : *maladie de* ~).
- métralgie**, **hystéralgie** ◇ **metralgia** ◇ **krozhost** b. Laur er grozh.
- métrite** ◇ **metritis** ◇ **krozho** g. Anvad rumm anaezioù tanijennel ar grozh.
- métrite décidualforme** ◇ **decidualform metritis** ◇ **krozho kollgennvanek** Anaez o tarvezout d'ar paouez mizioù, naouus dre vizwadiñvoù puilhek ha krozhwadiñvoù; dre vevsav glaourgenn ar grozh e stader un treuzfurmadur kollgennel leteñvel ouzh hini derou ar vec'hiegi; kiriek eo gourfaoted ar progesteron borc'het gant un dreistniver korfoù melen da heul borc'hañ reñverek ar gonadostimulin B.
- méthro-élytrorrhaphie** ◇ **metroelytrorrhaphy** ◇ **krozhgouindlita** Krafelañ speur araoz ar gouin pe briell araoz ar gouzoug ouzh speur adreñv ar gouin.
- métropathie** ◇ **metropathy** ◇ **krozhanaez** g. Anvad rumm klañvadurioù ar grozh.
- métropéritonite** ◇ **metroperitonitis** ◇ **krozhampelenno** g. Tanijenn ar grozh hag an ampelell.
- métrorragie** ◇ **metrorrhagia** ◇ **krozhwadiñvañ**, **krozhwadiñv** g. Gwadiñvañ ar grozh o tarvezout e-maez ar mizioù.
- métrorrhée** ◇ **metrorrhoea** ◇ **krozhaouez** b. Diver dourek (liñvenn amnionel) pe glaourek diouzh ar grozh.
- meulage** ◇ **grinding** ◇ **breolimañ** Araezad Dentouriezh, anezhañ benañ an dent a-raok dodañ osodoù.
- Meyer** : **réaction de** ~ ◇ **Meyer's test** ◇ **prouad** g. **Meyer** Dazgwered o lakaat war wel bezañs boc'hedel ar gwad er skediadoù pe en oulennoù; e arverañ a reer da arglask ar gwadiñvoù amguzh : ouzh an danvezenn da imboure'hiñ ez azdoder keduzenn Meyer (dileizhenn alkaliek fenolftalein direet dre ar poultr zink) hag un nebeut takennoù dour oksigen; mar bez gwad e tiouz ul livrezh ruz.
- Meyer-Schwickerath syndrome de** ~ ◇ **oculodentodigital dysplasia** ◇ **miwe** g. **lagad-dent-bizied** Testkad kamm-neuziadoù, anezho ezreolderioù an *daoulagad* (korrlagadegezh, skarlagadegezh, direizhoù ar ganevedenn, glaokom ganedigel, epikantuz), an *dent* (iswe an amailh) hag ar *bizied* (bizanskar ha krabanegezh daoudu ar 4^e ha 5^e biz); a-wechoù korrgloppeneghez

gant anpar atel ar fas, diwaoutad ha kammneuziadoù an eskern; kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek gant erzerc'haat daskenek.

Meynet : **nodosités de** ~ ◇ **Meynet's nodes** ◇ **ozvennoù** l. (b.) **Meyet** Yoc'hennoù bihan heloc'h dindan ar c'hroc'hen, pellennek pe viheñvel, o ment etre hini ur ferenn ha hini ur graoñenn gelvez, anezho gwiad kenglenel war neriñ, stadet e remm lemm an arzoù, alies e kefin ar c'henvelloù.

Mézières : **méthode de** ~ ◇ **Mézières method** ◇ **hentenn** b. **Mézières** Kalvezder prederiañ an drekwar, dre zehedañ kigennoù 'zo hag arloañ pozadoù dereizhet ent oberiat.

micelle ◇ **micella** (l. : **micellae**), **micelle** ◇ **mikellenn** (s. : **mikell**) Kevelstrollad molekul unrezh a zo enno daou barzh, an eil bleinek (dourlen : ar penn), egile alkil (dourlez : al lost), sk. : un drenkenn druz; lakaet en ur metoù liñvel bleinek (dour) pe anvleinek (benzen) e tenn an kez molekul da gevredañ, diouzh un urzh savelet, kenstok an holl bennoù ha kenstok an holl lostoù e doare da dreñ war-du ar metoù diavaez an eizhaenn lenidikañ outañ; a stumm pellennoù (e-tro 5 nm □), kranennoù pe taolennoù eo ar mikell; dre o bezañs en ul liñvenn ez amparont un arlunenn golloidel; dougen a reont tredanvec'hiadoù (sl. *colloïdal, électrophorèse*).

micro- ◇ **micro-** ◇ **1 mikro-** **2 korr-**, (-)is(-vent g., h.a.), **lav-**, **mikro-** 1 (Arouez μ) rakger o tenaouiñ 10⁻⁶. 2 Rakger oc'h arouezañ bihanded ar vent (hed, led, kavnez).

micro-aortie ◇ **hypoplastic aorta** ◇ **korraortegezh** b., **aortenniswe** g. Diouer diorreadur ganedigel an aortenn pe ul lodenn anezhi.

microaérophile ◇ **microaerophilic** ◇ **1 lavaervevat** aa. **2 lavaervevad** g. **-ed** 1 A-zivout bakteri a rank oksigen evit tiñvañ, nemet en ur bec'h izeloc'h eget en aergelc'h. 2 Bakterienn lavaervevat.

microalbuminurie ◇ **microalbuminuria** ◇ **troazhlavalbuminegezh** b. Muiadur leiek, kleñvedek evelkent, eus bezañs an albumin en troazh (etre 30 ha 300 mg/24 h); andinoadus dre an areazadoù klinikel klasel (lurelloù dazgwerediñ), en he lakaer war wel dre un hentenn dreistkizidik hangaegimiek; erzerc'haat a ra, gant an diabeteg da skouer, ul lounezhad en he deroù.

microangiopathie ◇ **microangiopathy** ◇ **lawwazhiedanaez** g. Darallad ar gwazhied bihan (talmerennigoù, gwazhiennigoù ha korrwazhied) tevaet o diazkennenn; al l. *diabetel* (Gl. *m. diabétique*) a zevoud rouestladoù grevus e par ar c'hroc'hen, al luc'hsae hag al lounezhi.

microbe, **micro-organisme**, **germe** ◇ **microbe**, **microorganism**, **germ** ◇ **garveg** g. **-ion**, **hadenn** b. **-où** Anvad rumm ar bevion unkellig, re vihan evit bezañ gwelet hep araez ar c'horrselezezh; termen oc'h arouezañ enta, ouzhpenn ar bakteri, bevedegoù evel ar govevion, al louedoù (*mikromiket*), ar protozoed, ar riketsi, ar spiroket, ar viruzoù (sl. *germe*).

microbicide ◇ **microbicial** ◇ **garvevlazh** aa. Gant ar perzh lazañ ar garvevion.

microbien ◇ **microbial** ◇ **1 garvevek** aa. **2 garvevel** aa. 1 A natur gant ar garvevion. 2 A-zave d'ar garvevion.

microbiologie ◇ **microbiology** ◇ **Garvevoniezh** b. Studi ar garvevion; *garvevoniezh trevvael* (Gl. *microbiologie écologique*) a reer eus rann ar G. o studiañ ar garvevion en amveziadoù naturel, disheñvel ar re-mañ diouzh amveziadoù an imboure'hvaou.

microbiome ◇ **microbiome** ◇ **garvevod** g. Lec'h eus ar bevedeg ma trig ur gumuniezh garvevion a lies spesad, ambredet e diarsell an darempredoù arc'hwelel kenetrezo hag etrezo hag an organoù ma vevont (pervez, kroc'hen, gouin) (sl. *flore intestinale, microbiologie, microbiote*, La-09 156 hh.).

NOTENN : Emaomp amañ en un domani ma taremoug an diarselloù bevoniell, trevoniell hag alvezoniell (fizikel-kimiek), alese al lies anvad roet d'ar c'humuniezhoù garvevion. Diouzh savboent ar Vevoniezh (hag ar Vezekniezh), e reer anv eus *garvevgorz* (Gl. *microbiote*; anvad kent : Br. *garveveg*, Gl. *flore*), en ur stiañ war an organoù ma trig ar garvevion. Diouzh savboent ar Drevoniezh, e komzer eus *garvevgant(ad)* (Gl. *microbiocénose*), en ur sellout ouzh saviad ar garvevion en natur a-bezh gant preder an trevezhiadoù (Gl. *écosystèmes*). Diouzh savboent an Alvezoniezh e pleder gant ar *garvevvaou* (Gl. *microbiotopes*), eleze an amvaou fizikel-kimiek ma trig ar garvevion.

microbiote, **flore** ◇ **microbiota**, **microflora** ◇ **garvevgorz** b., **garveveg** b. Kumuniezh dibarek garvevion a lies spesad o trigañ en un egorenn vevedel spesadel, sk. : ar *c'harvevgorz pervezel* (Gl. *microbiote instestinal*); an egorenn ma trig ur c'harvevgorz a reer ur *garvevod* (sl. *microbiome*).

microbisme ◇ **microbism** ◇ **garveviezh** b. Oberiezh ar garvevion bezant en ur metoù bevedel; g. *enkelat* (Gl. *micro-bisme latent*), bezañs er bevedeg eus garvevion kleñvedus na zec'hanont strafuilh ebet, en ervez da zevoudañ kleñvedoù mar darvez amveziadoù kevaraezus.

microblastes ◇ **microblasts** ◇ **mikroblast** s. Eritroblast a vent vihan.

microcardie ◇ **microcardia** ◇ **korrgalonegezh** b. Bihanded ar galon a-geñver gant pouez ha ment an hinienn.

microcathétérisme ◇ **microcatheterization** ◇ **korrgateteriñ** Sankañ ur sont moan kenan, kalvezder korvoet da erc'hwiliañ kavennoù dehou ar galon pergen.

microcaulie ◇ **microcaulia** ◇ **korrgalc'hegezh** b. Bihanded c'hanedigel ar c'halc'h.

microcéphalie ◇ **microcephalia** ◇ **korrgloppeneghezh** b. Bihanded ar c'hlopenn, dezhi lies furm arbennel : 1) ar *c'hlopenn-ïsvoll* (sl. *craniosténose*), 2) aneroubar an empenn (*korrgloppeneghezh dre gorrem-pennegezh*, Gl. *micro-encéphalie*), naouus dre ur c'hlopenn bihanoc'h met heneuz, e dargemm ouzh ur fas a vent reol, ha dre un dilerc'h bred muiek, hep strafuilh lagadel

nag uswask enklouennel, ezreolder a zo pe 2a) kentael, hêrezhel gant treuzkas er mod enkilek (*diodezh korr-gloppennek familhel*, Gl. *idiotie microcéphalique familiale*), pe 2b) eilvedel d'ur rizhellnaoued (sl. *embryopathie*).

microchirurgie ◇ **microsurgery** ◇ **korsurjianerezh** g. Rizh surjianerezh o tewerc'hañ, bennozh d'ur binviadur arbennikaet ha dindan gorgreskerezh oberatael, gwezhoù priminik war an organoù a vent vihan, da skouer korrzasforzhañ ar gwazhied hag an nervennoù e-kerz un oberatadenn adensteudañ ar bizied.

microcirculation ◇ **microcirculation** ◇ **lavamredañ** Tremen ar gwad dre gwazhied dindan 150 µm treuzkiz, o endotelienn o vezañ lec'h an eskemmoù etre ar gwad hag ar gwiadou, ganti un hedrezded diuzel evit an dour, ar molekul bihan dourlen hag an danvezennoù druzenn-dileizh, o tasperzhiañ ivez e paridigezh an hanteradoù kimiek gwazhiedwezhus.

microclimat ◇ **microclimate** ◇ **korrhinad** g. Amveziadoù aergelc'hel hag ebradurel piaouel d'ul lec'hienn dibarek eus an douaregor.

Micrococcaceae ◇ **Micrococcaceae** ◇ **Micrococcaceae** Kerentiad bakteri gougevret outañ ar genad *Staphylococcus* (ennañ lies spesad ar stafilokok, poreüs bras).

Micrococcus ◇ **Micrococcus** ◇ **Micrococcus** Genad bakteri, ankleñvedus peurliesañ, eus kerentiad ar *Micrococcaceae*.

microcôlon ◇ **microcolon** ◇ **korr-golonegezh** b. Aneroubar ar c'holon, e riskl an iskavnez anezhañ da zec'han darvoudoù antreizh pervez gant ar vagadell.

microcorie ◇ **microcoria** ◇ **korr-vabegezh** b. Mabisvoll ganedigel strizh kenan (dindan 2 mm treuzkiz).

microcornée ◇ **microcornea** ◇ **korr-gornsaegezh** g., **kornsaeisvent** g. Bihanded ezreol ar gornsae (dindan 10 mm treuzkiz), kammneuziad kevret alies gant ezreolderioù lagadel all.

microcytes ◇ **microcytes** ◇ **mikrokit** s. Kelligoù ruz a zo o zreuzkiz etre 6 ha 7 µm hag o ec'honad dindan 80 µm³ (p'emañ etre 7,2 hag 8,3 treuzkiz keitat hag etre 85 hag 88 µm³ ec'honad keitat an hemati reol).

microcytémie, microcytose ◇ **microcythaemia** ◇ **ruzisventegezh** b. Bezañs mikrokit er gwad (sl. *anémie microcytaire*).

microdactylie ◇ **microdactyly** ◇ **korr-viziegezh** b. Bihanded ezreol un pe lies biz dorn pe droad diwar aneroubar pe ezvezañs c'hanedigel un pe lies oñs.

microdontie, microdontisme ◇ **microdontia** ◇ **korr-zentegezh** b. Astal diorren un pe lies dant, a van gant mentoù ar vugel-izeh (sl. *dysarmo-nie dentomaxillaire*).

microfilaires ◇ **microfilariae** ◇ **mikrofilar** s. Furm rizhell el filar (sl. *filaires*).

microfilariémie ◇ **microfilaraemia** ◇ **mikrofilaremiezh** b. Bezañs mikrofilar er gwad.

microgénie ◇ **microgenia** ◇ **korrelgezhegezh** b. Skorted diorreadur balir an elgezh.

microglie ◇ **microglia** ◇ **mikroglia** g. Parzh a 'n neuroglia a orin mezoderme (sl. *névroglie*).

β-2 microglobuline ◇ **β-2 microglobulin** ◇ **β-2 mikroglubulin** g. Protein a dolz mol izel nes e luniad da hini an immunoglobulinoù G; digorvell polipeptidek skañv, paret gant ar reizhiad limfoidel dreist holl, bezant war goc'henn hogos an holl gelligoù, war un dro gant antigenoù HLA ar c'hlas I; evel ar re-mañ e kendaolfe da naouat heveleptet ar c'helligoù ha da wareziñ unveded an hinienn (sl. La-18 318-322); ent reol ez eo e wadvec'h etre 1 ha 2,4 mg/l; uhelaet a-galz e vez ar feur anezhañ e-kerz ar c'hleñvedoù unanhangael, al limfomoù hag ar poreadur dre ar VIHAD; an diaraoger eo da zanvezenn amiloidel ar skorteion lounezh.

microglossie ◇ **microglossia** ◇ **korredeodegezh** b. Bihanded an teod.

micrognathie ◇ **micrognathia** ◇ **korr-c'havedegezh** b. Bihanded ar c'haved.

microgramme ◇ **microgramm** ◇ **mikrogramm** g. Unvez tolz par d'ur vilionvedenn c'hramm, arouezet γ gwechall, µm hiziv. **micrographie** ◇ **micrography** ◇ **1 korrluniñ, korrlunerezh** g. **2 korrlun** g., **korrlunad** g. **3 Korrlunouriezh** b. **4 korrskriv** g. 1 Gwerañ (luc'hskeudenniñ, h.a.) dre araez ur c'horgresker. 2 Skeudenn dewerc'het dre gorrluniñ. 3 Skiant hag arz ar c'horrluniñ. 4 Strafuilh ar skrivañ, ar skritur o vezañ bihan hag o vont war vihanaat (sl. *agraphie, dysgraphie*).

microgyrie ◇ **microgyria** ◇ **korrdroennegezh** b. Bihanded troennoù an empenn dre anteñv pe dre aneroubar.

microhématurie ◇ **microscopic haematuria** ◇ **troazhlawadagezh** b. Troazhwadagezh leiek, dinoadus hepken dre gorr-sellerezh gouezet an troazh.

microhémoculture ◇ **capillary blood culture** ◇ **gwadtiñvañ silluskadel** Gwadtiñvañ war wad erlamet dre silluskañ.

microlithiase ◇ **microlithiasis** ◇ **korr-c'hrouanegezh** b. Diwan grouan korr-greskere (korr-c'hrouan, Gl. *microcalculus*).

microlithiase alvéolaire pulmonaire ◇ **pulmonary alveolar lithiasis** ◇ **korr-c'hrouanegezh al logigoù skevent** Kleñved hêrezhel dibaot treuzkaset er mod aotozomek enkilek, naouus, *ent-neuziadurel*, dre ar vezañs en holl logigoù ar skevent eus grouan bihan (100-200 µm) haenek, ouzh o ober ur mukoprotein intret gant kalkiom; dre ar skinluniñ e stader un arvez graek doues oc'h aloubiñ an div vaezienn; *ent-klinikel*, goude menel diazon e-pad pell amzer, dre un dedro d'ar skorted analadel ha d'ar falladur kalon dehou.

micromanomètre, phonocathéter ◇ **micromanometer, phonocatheter** ◇ **mikromanometr** g., **fonokateter** g. Ardivink bihan (8 mm hed, 2,7 mm treuzkiz) marc'het ouzh beg ur c'hateter, amkanet da erc'hwiliañ kavennoù ar galon hag ar gwazhied; araezañ a ra dewerc'hañ kevregadoù resis tre eus ar gwask ha da lerc'hwezañ an trouzoù hag ar sourroù.

micromastie ◇ **micromastia** ◇ **korrvronnegezh** b. Skorted diorreadur an divvronn.

micromélie, brachymélie, nanisme micromélique ◇ **micromelia, brachymelia** ◇ **korrezelegezh** b., **ezelished** g. Berreded an izili e dargemm ouzh diorreadur reol ar c'hef; furm dibarek : ar *k. hanrannel kemparzh* (Gl. *m. segmentaire symétrique*), ished hanrannoù kevelep an izili, kammneuziad o tizhout ar vrec'h dreist holl, familhel a-wechoù.

micromètre ◇ **micrometer** ◇ **mikrometr** g. 1 Ardivink arveret da vuzuliañ ar regadoù bihan. 2 Unanenn regad (arouez μm) par d'ur vilionvedenn metr (gwechall anvet *mikron* hag arouezet γ).

micromole ◇ **micromole** ◇ **mikromol** g. Milionvedenn mol (arouez μmol) (sl. *mole*).

micronodulaire ◇ **micronodular** ◇ **nozelanek** aa. O naoùñ e rezh nozelennoù bihan pe *nozelanoù* l. (g.) (Gl. *micronodules*), (etre 1,5 ha 3 mm \varnothing), sk. : *torzhellegezh nozelanek* (sl. *granulie*, La-18 260).

microphages ◇ **microphages** ◇ **mikrofag** s. Fagokit a vent vihan, anezho granulokit neutrofil pe eozinofil (sl. *phagocytes*).

microphakie ◇ **microphakia** ◇ **korrfennegezh** b. Bihanded ezreol ar ferenn.

microphthalmie ◇ **microphthalmia** ◇ **korrlagadegezh** b. Ezreolder ganedigel naous dre verded holl dreuzkizoù al lagad.

micropolyangéite microscopique, micropériartérite nouvelle ◇ **microscopic polyangeitis** ◇ **lieslavwazhiedfo** g., **tro-lavdalmerennfo** g. **ozvennek** Anaev o tarvezout e-tro 50 vloaz, nes d'an trodalmerennfo ozvennek (sl. *péri-artérite nouvelle*), diforc'h dioutañ dre dizhadur gwazhied bihanoc'h o c'havnez, erzerc'hat dre anafoù diseurt evel ar gwadliñvoù skevent enologel, ar bloueigo marvenn hanrannel o trediñ etrezek ar skorted lounezh.

micropsie, micropie ◇ **micropsia** ◇ **gwelissent** g. Kammzerc'h oc'h ober gwelout bihanoc'h an traoù.

microrchie ◇ **microrchidia** ◇ **korrgellegezh** b. Bihanded ezreol an divgell kevret gant ar c'haonac'hded.

microrhinie ◇ **microrrhinia** ◇ **fronisled** g. Strizhded an divfron diwar aneroubar ar garvan, o leiaat pe o vannelaat an esaou etre ar grogen draoñ hag an dilhenn.

microrragie ◇ **microrrhage** ◇ **lavwadañ, lavwadañ** g. Gwadliñvañ munut.

microscope ◇ **microscope** ◇ **korrgresker** g. **-ioù** 1 *Korrgresker optikel*, benveg optik oc'h areazañ gwelout ergorennoù anverzhadus d'ar sell diglav dre bourchas ur skeudenn vrasaet anezho diwar-bouez ur stellad ferennoù, e varr muiaat (Gl. *pouvoir de grossissement*) o vont betek 1 500 gwech, gant un og (pe *barr diarunsted*, Gl. *pouvoir de résolution*) 0,2 μm . 2 *Korrgresker elektronek*, o korvioñ hordennoù elektron gouskoget a-dreuz gwarellvaezioù, lies rizh anezhañ : ar *k. e. dre c'hwilervañ* (Gl. *m. électronique à balayage*), dezhañ un og a ya betek 3 nm, ar *k. e. dre dreuzkas* (Gl. *m. é. à transmission*), o tiraev un og par d'ar pellder etre div atomenn (0,2 nm).

microscopie ◇ **microscopy** ◇ **korrgreskerezh** g., **korrsellerezh** g. Kalvezder imbourc'h dre ar c'horrresker.

microscopique ◇ **microscopical** ◇ **1 korrgreskere** aa. **2 korrgreskerel** aa., **korrselladel** aa. 1 Na c'haller merzhout nemet dre ar c'horrresker, sk. : *Foue korrgreskere*. 2 A-zave d'ar c'horrresker pe d'ar c'horrreskerezh, sk. : *un imbourc'h korrgreskerel, korfadurezh korrselladel*.

microsérologie ◇ **microserologie** ◇ **Korrvadveizouriezh** b. Studi kimiek, bevoniel, h.a. ar gwadveiz graet war gementadoù munut gwad, erlamet dre bikañ beg ar biz.

microsérologique ◇ **microserological** ◇ **korrvadveizourel** aa., **korrvadveizel** aa. A-zave d'ar gorrwadveizouriezh.

microsomatie, microsomie ◇ **microsomia** ◇ **korrgorfegezh** b. Bihanded ar c'horf war un dro gant kenfeurioù reol etre e barzhioù hag un diorreadur reol eus e holl arc'hwelioù (sl. *nanisme*).

microsome ◇ **microsome** ◇ **mikrozom** g. Rannig vunut bezant e-barzh protoplasm ar c'helligoù, sk. : ar *ribzomoù*, al *lizozomoù*.

microsphérocytose ◇ **microspherocytosis** ◇ **mikrosferokitoz** g. Bezañ war al lifrad gwad eus hemati bihan ha pellennek, reol o ec'honad evelkent, arvez a stader alies gant gouziviaded an ikter gwadloezadel (amwad gwadloezadel ganedigel, rizh Minkowski-Chauffard) (sl. *ictère hémolytique*).

microspondylie ◇ **microspondylia** ◇ **mellennissav** g. Kammneuziad c'hanedigel dibaot, naous dre leiadur sav un pe lies mellenn.

microsporidies ◇ **microsporidiae** ◇ **mikrosporidi** s. Protozod arvevat ret enkelligel eus skourrad ar *Microspora*, kiriek d'ar mikrosporidiz (Gl. *microsporidiose*), arvevadegezh loenel a gaver hiziv evel rouestlad an haza, naous dre zarc'hoalioù henek falezhus.

microsporie ◇ **microsporia** ◇ **mikrosporiezh** b. Anvad rumm an dermatozioù diwar ur foue eus ar genad *Microsporon* (sl. *pityriasis versicolor, teigne*).

microsthésie ◇ **stokisvent** g. Darallad an denaoud stokadel oc'h ober andalañ evel skañvoc'h ha bihanoc'h an traezoù dalc'het en dorn.

microstomie ◇ **microstomia** ◇ **genaouisled** g. Bihanded c'hanedigel faout ar genoù.

microtie ◇ **microtia** ◇ **korrskouarnegezh** b. Bihanded ezreol an divskouarn.

microtome ◇ **microtome** ◇ **mikrotom** g. Ardivink arveret er wiadoniezh hag er wiadkleñvedouriezh da droc'hañ ar gwiadoù e skejennoù moan a-walc'h (un nebeut μm) evit bezañ arsellet dre ur c'horrresker dre dreuzwel.

- microtubule** ◇ **microtubule** ◇ **korribell** b. Organit enkitoplasmel e stumm ur gorzenn 24 nm keitat kavnez, ouzh e ober kenstrolladoù molekul *tubulin*, forzhioù ma tilec'h elfennoù kelligel, o tasperzhiañ en amparadur organitoù diseurt (blevanoù, skourjeziogoù, gwerzhidoù mitotek); an hent eo ivez ma tremen ar viruzoù.
- microvillosité** ◇ **microvilli** ◇ **bodan** g. Azledad kitoplasm goloet gant ar goc'henn, a niver bras pe vrasoc'h war ar c'helligoù, o arc'hwel muiaat ar gorread eskemm anezho (sl. *bordure en brosse*).
- miction** ◇ **miction**, **micturition**, **urination** ◇ **dezioulañ**, **dezioulad** g. Ec'hodiñ an troazh eus ar c'hwezhigell dre ar c'han troazh, real bonan, kemplezh, anezhañ kedrannoù diarzoug ha diarvenn, anezhañ an troazhañ boutin (sl. *énurésie*, *incontinence*, *rétenion*, *urination*, La-18 150).
- miction par regorgement** ◇ **overflow**, **paradoxal incontinence** ◇ **troazhodiñ dre c'hourberañ** Diver an troazh diouzh ur c'hwezhigell usvollek nad eo mui evit argezañ.
- mictionnel** ◇ **mictional** ◇ **deziouladel** aa. A-zave d'an dezioulañ.
- MIDA**, **mento-iliaque droite antérieure** ◇ **RMA**, **right mentoanterior position** ◇ **EDAK**, **erload** g. **elgezh dehou a-raok** Er gwilioud, erload ar penn dibleget, hevelep ma teu er-maez da gentañ ar fas en e bezh, gant an elgezh troet war du dehou al lestr ha war raok (sl. *MIDP*, *MIDT*, *MIGA*, *MIGP*).
- MIDD** ◇ **MIDD**, **maternally inherited diabetes and deafness** ◇ **MIDD** Azoniad hêrezhel dibaot, treuzkaset dre ar merc'hed, a orin mitokondriel, o kevredañ diabet c'hwec'h ha bouzarder dec'havael.
- MIDP**, **mento-iliaque droite postérieure** ◇ **RMP**, **right mentoposterior position** ◇ **EDAV**, **erload elgezh dehou a-dreñv** Er gwilioud, erload ar fas stadet an aliesañ, an elgezh troet war du dehou al lestr ha war dreñv (sl. *MIDA*, *MIDT*, *MIGA*, *MIGP*).
- MIDT**, **mento-iliaque droite transverse** ◇ **RMT**, **right mentum transverse presentation** ◇ **EDAZ**, **erload elgezh dehou a-dreuz** Erload ar fas, an elgezh "troet war 9 h" (sl. *MIDA*, *MIDP*, *MIGA*, *MIGP*).
- Mietens** : **syndrome de ~** ◇ **Mietens syndrome** ◇ **azoniad Mietens** Teskad dibaot kammneuziadoù, anezho korreded, dilerc'h bred, dargrezad war bleg a 'n ilinoù, nistagmuz ha demerrennoù a 'r c'hornsae.
- mifépristone** ◇ **mifepristone** ◇ **mifepriston** g. Steroid kevanaozel lenidikoc'h eget ar progesteron ouzh buzerioù ar c'helligoù buk, gantañ perzhioù bec'hastaliñ ha dizennezhiañ, danvezet evel hilastaler goude keventrac'h hag evel divec'hieger.
- MIGA**, **mento-iliaque gauche antérieure** ◇ **LMA**, **left mentoanterior position** ◇ **EKAK**, **erload elgezh kleiz a-raok** Erload ar fas stadet an aliesañ goude an EDAV, an elgezh o vezañ troet war du kleiz al lestr ha war raok (sl. *MIDA*, *MIDP*, *MIDT*, *MIGP*).
- MIGP**, **mento-iliaque gauche postérieure** ◇ **LMP**, **left mentoposterior position** ◇ **EKAV**, **erload elgezh dehou a-dreñv** Erload ar fas dibaot, an elgezh troet war du kleiz al lestr ha war dreñv (sl. *MIDA*, *MIDP*, *MIDT*, *MIGA*).
- migraine**, **hémicrânie** ◇ **migraine** ◇ **kernad b.**, **ledost b.** **klopenn** Azoniad naouus dre varroù klopennost talmus garv a orin gwazhiedloc'hadel, untu peurliesañ, sezet er rannbarzhioù ividig ha pod lagad, kevret gant un diaezad hollek, asikted, heugennoù ha c'hweladoù, anadennoù gweledel a-wechoù (sl. *migraine ophtalmique*).
- migraine accompagnée ou avec aura** ◇ **associated migraine** ◇ **kernad ambrouget pe gant aora** Kernad ma tarvez, ouzhpenn ar glopennost, arouezioù gwazhiedloc'hadel, nervel (kammeraezioù, glizi, ankomez) ha gweledel padennek.
- migraine basilaire** ◇ **basilar artery migraine** ◇ **kernad diazpennek** Kernad diadreñv ambrouget gant arouezioù gouzañvder talmerenn an diazpenn (trolernioù).
- migraine ophtalmique** ◇ **ophthalmic migraine** ◇ **kernad gweledel** Kernad naouus dre anadennoù gweledel dibarek (skotom fulennek, Gl. *scotome scintillant*) o tiaraogiñ ar glopennost.
- migraine ophtalmoplégique** ◇ **ophthalmoplegic migraine** ◇ **kernad lagadseziek** Barroù kernad garv, o padout devezhioù, oc'h echuiñ trumm, heuliet gant ar seizi klok, a-wechoù hirbad, eus nervenn loc'hañ al lagad.
- migr-**
 • *douleurs migratrices* laurioù kantridid • *érythème chronique migrateur* eritem henek kilhataer • *les globules blancs traversent les parois vasculaires et deviennent cellules migratrices* al leukokit a dreuz speurioù ar gwazhied hag a zeu da vezañ kelligoù emdizhat • *migration d'un calcul à travers l'uretère* grouanenn o treankañ pe war drank dre ar san droazh.
- Mikulicz** : **sac** ou **drain de ~** ◇ **Mikulicz drain** ◇ **sac'h** g. pe **gwehenell** b. **Mikulicz** Tapon chouket ennañ bandennoù gazenn a ebarzher e kavenn ar c'hof evit he gwehenniñ goude an torenbenañ.
- Mikulicz** : **1 syndrome de ~** **2 maladie de ~**, **ostéodystrophie juvénile kystique** ◇ **2 Mikulicz disease** ◇ **1 azoniad Mikulicz** **2 kleñved Mikulicz**, **askornvideñv** g. **yaouerel kistek** 1 Usteñv daoudou, dilaur, henek eus gwagrennoù an halv hag an daeroù, a-wechoù gant heskadur ar borc'hañ; azoniad stadet alies e-kerz kleñved Besnier-Boeck-Schaumann. 2 Kleñved kuñv eus oad ar c'hreskiñ, o tiraerz alies ardalpenn eskern hir an izili, naouus dre furmadur ur c'hist unek hag anafoù askornfo stirek.
- Milgram** : **épreuve de ~** ◇ **Milgram's test** ◇ **prouad** g. **Milgram** Prouad da erc'hwiliañ stad al livenn : salv a nep anaf enlivennel eo ar gouziviad mar gell, en e c'hourvez a-gein, derc'hel e izili traoñ 5 cm a-us talenn an daol e-pad 30 eilenn.

miliaire ◇ **1 miliaria** pa. **2 miliary** aa. ◇ **1 milierenn** b. **2 milier** aa. 1 Dispuilhad o tarvezout goude c’hweziñ a-fonn, anezhañ c’hwezigennou munut a vent gant greun mell, war o zro un amdioñv bihan damroz, al liñvenn enno o vezañ boull en derou, o vont leidek (*m. wenn*) hag a-wechoù linek (*m. velen*); dre vras e sell an aozerion c’hwezigennou ar vilierenn evel kistoù c’hwezparadel. 2 (sl. *granulie*).

miliaire ◇ **miliary** ◇ **milier** aa. A vent gant greun mell pe naouus dre anafoù eus ar vent-se, sk. : *kolloidom m.* (Gl. *colloïdome m.*, sl. *colloïd milium*), *pugnez m.* (Gl. *abcès m.*), *akne v.* (Gl. *acné m.*), *lupuz milier* (Gl. *lupus m.*, sl. *sarcoïdes cutanées*), *terzhienn v.* (Gl. *fièvre m.*, sl. *suette miliaire*).

miliaire : **anévrisme** ~ ◇ **miliary aneurysm** ◇ **darvoll** g. **milier** Darvoll munut (etre 0,2 hag 1 mm treuzkiz) setez war dalmerennigoù an empenn, ar freg anezhañ en orin ur gwadliñv empenn.

miliaire : **image** ~ ◇ **miliary image** ◇ **skeudenn** b. **vilier** Neuz skinlun a ’r skevent, anezhi, war skoulmoù an anneuenn, ur strewad reolek demerennou bihan niverus, arront, a vent gant greun mell; stadet er vilierenn, e poreadoù skevent garvevel pe viruzel, er c’harkinoz, en analeuflegezhioù, e kleñved Besnier-Bœck-Schaumann, e-kerz an isvoll mintrek ha kollagenozioù ’zo (sl. *carcinose, granulie, pneumoconiose*).

Milian : **maladie** ou **trisyndrome de** ~ ◇ **Milian disease** ◇ **kleñved** pe **triazoniad Milian** Anaez kroc’hen a ve a orin strepokokel, naouus dre deir urzh azonou : 1) maelennoù ledan parakeratozek hollek, 2) tachadoù gouliñvek eritemata, 3) c’hwezigennou ha gloevennoù dizidroz.

milieu

• *milieu ambient, environnement, ambiance* amva • *milieu bilié* metoù bestlet • *milieu de culture* metoù tiñvañ • *milieu de Sabouraud* metoù Sabouraud • *milieu dispersif* arc’hronnenn • *milieu environnant* amva • *milieu gélifié* metoù gelekaet • *milieu intérieur* metoù diabarzh • *milieu liquide* metoù liñvel • *milieu naturel* metoù naturel • *produit, milieu, substance* aozenn.

Milkman : **syndrome de** ~ ◇ **Milkman syndrome** ◇ **azoniad Milkman** Teskad klinikel, ouzh e ober laurioù strewek en eskern, andraftet a ’n izili traoñ, neuz skinlun dibarek eskern ’zo (kostoù, planken skoaz, barr traoñ an askorn kaezour), anezho faoutoù linennek kempartzhek (rizennoù Looser); azoniad dec’hanet peurliesañ gant an negez bouedel, a seller evel ur furm glinikel eus an askornvloodad.

Millard-Gubler : **syndrome de** ~ ◇ **Millard-Gubler paralysis** ◇ **azoniad Millard-Gubler** Kevreted ur seizi a ’n dremm a rihz trobarzhel, a-wechoù a ’n nervenn bellaat agendu d’an anaf hag ul ledseizi a-eiltu (dastuat), e dianlen un anaf er pont.

Miller : **index de** ~ ◇ **Miller index** ◇ **ditourenn** b. **Miller** Feuriadur gwazhiedlunadel an enfroù skevent savelet diwar glennadur an anforzhioù hag an amweredoù war red ar gwad er c’horwazhied; sifr an ditourenn a verk grevusted an enfroù.

milli- ◇ **milli-** ◇ **mili-** (Arouez m) Rakger o verkañ ar vilvedenn, sk. : *milikuri* (sl. *curie*).

milliéquivalent, mEq ◇ **milliequivalent, mEq** ◇ **milikevatal** g., **mEq** Milvedenn ar c’hevatal (sl. *équivalent*), unanenn arveret er vevoniezh da zerc’hennañ bec’h ion un dileizhenn evit studiañ ar c’hempouez etre an ion trenkek hag an ion bazek e-barzh liñvennoù ar bevedeg.

Millikan-Siekert : **syndrome de** ~ ◇ **Millikan-Siekert syndrome** ◇ **azoniad Millikan-Siekert** Strafuilhoù nerval da heul un divig amredel spanaus e talmerenn an diazpenn diwar an aterm, naouus dre ul ledseizi tugindu, seizioù an nervennoù aglopenn, un azoniad ilpennel ha direizhoù ar genskiant : darvoudoù trumm, hogen eiltroüs.

millimole, mmol ◇ **millimole, mmol** ◇ **milimol** g., **mmol** Milvedenn ar mol, unanenn tolz mol arveret er vevoniezh da zewerzhañ bec’h ar c’horfoù (glukoz, trenkenn urek, h.a.) war zileizh e liñvennoù ar bevedeg.

Millin : **opération de** ~ ◇ **Millin operation** ◇ **gwezhiadenn** b. **Millin** Ezvenañ ar raksavenn dre an hent drek-kaezour e-maez c’hwezhiagell.

milliosmole ◇ **milliosmole** ◇ **miliosmol** g. Milvedenn an osmol (mOsm), unanenn arveret er vevoniezh da zerc’hennañ grenn ar c’horfoù war zileizh e-barzh liñvennoù ar bevedeg (sl. *osmole*).

milliröntgen, mr ◇ **milliröntgen, mr** ◇ **milirontgen, mr** Milvedenn ar rontgen (sl. *röntgen*).

Mills : **syndrome de** ~ ◇ **Mills disease** ◇ **azoniad Mills** Azoniad dibaot naouus dre ul ledseizi dargrezadec deraouet en troad oc’h askennañ gorrek e-doug bloavezhioù betek diraez an ezel krec’h a-gendu, hebiat d’ar fas; dianav e orin.

Milwaukee : **corset de** ~ ◇ **Milwaukee jacket** ◇ **korfenn** g. **Milwaukee** Kavnell amkanet da zereizhañ an treuzwar, arloet ouzh ar c’hef, harp ouzh an elgezh, ar c’hilpenn ha gouriz an ezel traoñ.

-**mimétique** ◇ **-like** ◇ **-keveler** aa. & g. **-ioù, -vanek** aa. Lostger o verkañ leteñvelder ar gweredoù etre un danvezenn naturel ha danvezennou all, naturel pe gevanaozel, sk. : *morfingeveler* (sl. *morphino-mimétique*), *aketilkolinvanek* (sl. *acétylcholino-mimétique*).

mimétisme ◇ **mimicry, mimetism** ◇ **arundelviñ** Araezad difenn e piau spesadoù loened ’zo, anezhañ gwiskañ neuz spesadoù all gwarezet mat, e doare da chom e-maez ardirzh ar preizhered; disheñvel enta diouzh an *arunskediñ* (Gl. *homophanie*), hemañ o vezañ an emazasaat diouzh goulaouder an endro.

mimique ◇ **mimic, mimicry** ◇ **1 meidiñ** **2 meid** g. **3 meidel** aa. 1 Mod eztaoliñ dre ar jestroù hag an neuzioù dremm; e bredanaezioù ’zo ez a strafuilhoù ar meidiñ da azonou. 2 Jestr pe neuz dremm dibarek e kement ha desellet evel eztaol. 3 Perzh bezañ meid, sk. : lavar teodel ha lavar meidel (Gl. *langage oral et langage mimique*).

Minamata : *maladie de* ~ ◇ **Minamata disease** ◇ **kleñved Minamata** Aneaz bet dizoloet e 1953 en ur gêr aodad eus enez Kyushu, e Japan, emetoù ur boblañs o vevañ diwar besked euveret gant leziedoù greantel laosket er mor, anezhañ ur pistriadir bevargantel henek oc'h erzerc'hañ dre strafuilhoù nervel goulemm ha marvus alies : laurioù grizias, peluzioù, ankedre ilpennel, dallantez, direizhoù bred, ivez dre ar genel bugale ezreol ; ha hi prouet ken abred ha 1959, kiriegezh ar saotradur ne voe ket reot kevazañv kefridiel dezhi a-raok 1965.

minéralocorticoïdes ou **minéralocorticostéroïdes** ou **hormones minéralotropes** ◇ **mineralocorticoids** ◇ **meingae-nhormonoù** l. (g.), **mineralokortikoidoù** l. (g.) Stroll hormonou borc'het gant haenad vloueigek ar gaenuslouezenn, gwezhus war gennevid ar c'hevionennoù hag an dour ; an hini anavezet nemetañ eo an aldosteron ; ur gwered leteñvel ez eus gant ur c'hevanaozad, an dezoksikortikosteron.

minerve ◇ **minerva-plaster jacket**, **minerva** ◇ **steudell** b. **c'houzoug**, **minerv** g. Kavnell arloet ouzh ar gouzoug, harp ouzh an elgezh hag ar c'hilpenn, amkanet da ziloc'hekaat ar penn hag al livenn c'houzoug war-benn dereizhañ ur penngam kigenne pe derc'hel direet torr pe disvellad ur vellenn.

Minervini : *signe de* ~, **pouls lingual** ◇ **Minervini sign** ◇ **arouez** b. **Minervini**, **poulzad** g. **teod** Lammoù sistolel en teod, stadet a-wechoù e skorted an aortenn.

mineur

• *mineur*, *discret*, *léger*, *atténué*, *modéré*, *limité*, *faible*, *minime*, *fruste* leiek, diheverzh, dihwel, gougel, argrenn, blin, gwan, izel
• *chorée mineure* korea leiek • *fièvre mineure*, *fébricule* terzhienn leiek, terzhiennig • *insuffisance mitrale mineure* skorted vintrek leiek • *variole mineure* brec'h leiek.

Mingazzini : *épreuve de* ~ ◇ **Mingazzini test** ◇ **prouad** g. **Mingazzini** Embregad evit lakaat war wel ur gouseizi leiek en un ezel : pediñ a reer ar gouziviad gourvezet a-gein, serr e zaoulagad, da blegañ e zivvorzhed da 90° war e lestr hag e zivc'har da 90° war e zivvorzhed ; mar bez gouseizi e stader ur gouzizadur argammedek eus an troad ; e Frañs e reer anv kentoc'h eus *prouad Barré*, ar c'hemm nemetañ eo e vez gourvezet a-gof ar gouziviad ; un embregad leteñvel a c'haller ren gant an izili krec'h.

mini mental state examination, **MMS** ◇ **mini mental state examination**, **MMS** ◇ **berrimbouc'h** g. **ar stad vred**, **MMS** Hentenn eeunaet da andalañ ar stad vred, ar skeul o vont eus 30 gant ar gouzrec'h reol betek mann evit an divigadoù donañ.

minimale efficace : *posologie* ~ ◇ **minimum effective dose** ◇ **doenad** g. **izek efedus** Doenad un danvezenn ret da zec'han gweredoù war ar bevedeg ; anv a reer ivez eus *loi du minimum efficace*, daoust d'an ankewer ez eo ober anv a "saveleñn" en degouezh.

miopragie, **méiopragie** ◇ **miopragia** ◇ **gouzigon** g., **meiopragiezh** b. Bec'h gant un organ bet anafet da gefleuniañ e arc'hwel.

Mirizzi : *syndrome de* ~ ◇ **Mirizzi syndrome** ◇ **azoniad Mirizzi** Ikter dre an amwask war san voutin an avu gant ur gaouledenn kouboulet ebarzh san ar gellenn ; darvoud hemañ a c'hoarvez pa vez izel difourk san ar gellenn er san voutin, an div ganol o tehentiñ kempeg.

misanthropie ◇ **misanthropia** ◇ **dengaz** g. Erez ouzh darempredoù ar gedvuhez, azon a hipokondriezh a-wechoù.

misogynie ◇ **misogyny** ◇ **bengaz** g. Erez ouzh an darempredoù kedvuhez ha revel gant ar merc'hed ; er yezh voutin, dismeg ouzh ar merc'hed.

mithridatisme ◇ **mithridatisme** ◇ **mitridategezh** b. Dre zave da vojenn emdozelladur ar roue Mitridates, gougemerusted arzeuat ouzh ar pistrioù meinel ha struzhel gounezet dre vuiaat ent argammedek an doenoù diounezet (sl. *accoutumance*).

mitochondriales : *maladies* ~, **mitochondriopathies** ◇ **mitochondrial diseases** ◇ **kleñvedoù mitokondriel**, **mitokondriadoù** Anvad genadel a 'r c'hleñvedoù o tizhout ar mitokondri, evel isteñv gwelede Leber, an divig karnitin, azoniadoù Kearns ha Sayre, h.a. (sl. *Kearns et Sayre : syndrome de* ~, *Leber : maladie pe atrophie optique de* ~, *Pearson : syndrome de* ~).

mitochondries ◇ **mitochondria** (u. : **mitochondrion**) ◇ **mitokondri** s. Organit eus ar c'hitoplasm bezant e kement kellig 'zo, diseurt a vent, a neuz hag a niver, amparet gant un divgoc'henn en dro d'ur bleuskenn amlun, o tasperzhiañ en holl anadennoù oksidañ, o taspugn ar gremm kelligel e rezh trenkenn adenosin trifosforek (ATP) (sl. *chondriome*).

mitogène, **mitogénique** ◇ **mitogenetic** ◇ **mitoseiat** aa. O tevoudañ ar mitozioù ; e ser an hangaeoniezh e talvez an termen *mitoseiat* da arouezañ an danvezennoc'h ober, *in vitro*, d'al limfokit treiñ e kelligoù blastel (sl. *lectine*).

mitose, **caryocinèse**, **division cinétique** ◇ **mitosis** ◇ **mitoz** g., **kariokinez** g. Mod emrannañ ameeun a 'r gellig, naous dre ur steudad daskemmadurioù e kromatin ar graoñell ; en holl gelligoù ar bevedeg nemet er c'helligoù revel — eleze e kelligoù ar *soma* — e c'hoarvez ar mitoz eus dizoubladur kromozomoù ar gellig vamm, e doare ma tegemer pep hini eus an div gellig verc'h un niver kromozomoù par da hini ar gellig vamm, e kemm war ar poent-se diouzh ar *meios* (sl. *caryocinèse*, *caryotype*, *cinétique cellulaire*, *cycle cellulaire*, *cytociinèse*, *fuseau mitotique*, *méiose*, *prophase*, *méta-phase*, *anaphase*, *télophase*, *interphase*).

(-)mitotique ◇ (-)mitotic ◇ **mitotek** aa., (-)mitoz(-) A-zave d'ar mitoz, sk. : *gwerzhid vitotek* (sl. *fuseau mitotique*), *mitozastaler* (sl. *antimitotique*).

mitral ◇ **mitral** ◇ **mintrek** aa. A-zave d'ar gwask mintrek (anvad kent ar *gwask kentez-kofig kleiz*) ha d'ar benvegad trapigell anezhañ ; *enebrezh m.* (Gl. *faciès m.*), nead ruzart, gwizhi, divweuz persdu, alies akne ha bourbon, neuz dibarek gouziviaded an isvull mintrek (sl. *insuffisance mitrale*, *maladie mitrale*, *rétrécissement mitral*, *veinosité*).

mitralite ◇ **mitralitis** ◇ **mintrekfo g.** Tanijern ar gwask mintrek hag ar benvegad trapigel anezhañ, a orin remmel peurliesañ; dedreñ a ra da isvroll ha da skorted ar gwask mintrek e rezh un anaf kleizennel ma trebad a-wechoù un argerzh foel (sl. *maladie mitrale*).

mixique pulmonaire ◇ **intrapulmonary mixing** ◇ **diavesk g. enskevntel** Parzh eus treloc'herezh an analañ o tennañ da zizolc'h hag da zaspargh an aezhennoù analadel e-barzh flipezennoù ar skevent : dewerzhed e vez dre vuanez dizolc'hiñ un aezhenn neptu da geñver muzul an ec'honad dilerc'h.

mixture ◇ **mixture** ◇ **keffia g. -où** Angevezh apotikel o c'hoarvezout eus ur meskad liaoù, anvad roet dreist holl d'ar meskadoù a zo enno un danvezenn gwezhus tre hag, e se, amkanet d'an diouinit a zoenadoù bihan, dre dakennoù pergen.

1 2 mnésique 3 mnésique, conscient ◇ **1 2 mnesic, mnestic 3 mnesic, conscious** ◇ **1 kounerezhak aa., kounek aa. 2 kounerezhel aa., kounel aa. 3 anankouneiat aa., kenskiantek aa.** 1 O piaouañ arc'hwel ar c'hounerezh. 2 A-zave da arc'hwel ar c'hounerezh. 3 Na zevoud ket an ankoun, sk. : *droukfell anankouneiat pe kenskiantek* (Gl. *épilepsie mnésique pe consciente*), (sl. *amnésique*).

mobilisation ◇ **mobilization** ◇ **1 deloc'hañ 2 defñival** 1 (Ster hollek) ober loc'hañ, sk. *deloc'hañ izili ur c'hlañvour da zeznaouiñ an darsonn*. 2 (Leuñvouriezh) ober fiñval; diouzh an dro e reer anv eus : 1 an *defñival oberiat* (Gl. *mobilisation active*), ar gouziviad o ren e unan ar fiñvoù diwar gentod al leuñvour, anezhañ *a*) pe un *d. o. rik pe d. peuroberiat* (Gl. *m. active pure*), *b*) pe un *d. o. améilet* (Gl. *m. active soutenue pe m. activo-passive*). 2 An *defñival gouzañvat* (Gl. *mobilisation passive*), fiñvoù ar gouziviad o vezañ renet gant daouarn an arouel 3 an *defñival helc'h* pe *darfiñval* (Gl. *mobilisation forcée pe manipulation*), anezhañ kas ar fiñval en tu all da heled reol ar c'henvelloù, kefleuñvad embreget gant an osteopated.

mobilité ◇ **mobility** ◇ **1 heloc'hded b. 2 loc'husted b. 3 fiñvusted b.** 1 Dre vras, gallusted evit nep ergorenn da gemmañ e geñverioù egorel, sk. : *heloc'hded an elektron*. 2 Gallusted evit ur parzh korf da gemmañ lakadur, sk. : *loc'husted ur c'henvell 3 perzh gant un dra vev pe dezerc'hadur un dra vev da gemmañ lec'h*, neuz pe lakadur, sk. : *fiñvusted ar spergelligoù, fiñvusted ar bizied, fiñvusted ar skeudennoù bliverezh* (sl. *motilité, motricité*).

(-)mobil-

- *appareil d'immobilisation* steudell disloc'h
- *appareil de contention servant à immobiliser partiellement la colonne vertébrale cervicale* kavnell disloc'h evit derc'hel damziññ al livenn c'houzoug
- *articulation mobile* arz heloc'h
- *articulation normalement mobile* kenvell heloc'h ent vonan
- *cellules mobiles (leucocytes)* kelligoù heloc'h (leukokit)
- *chercher à mobiliser les membres du malade* klask deloc'hañ izili ar c'hlañvour
- *dents rendues mobiles par la parodontose* dent aet distrantell gant ar parodontoz
- *fixe, fixé, immobile* fest
- *forme larvaire libre et mobile* furn larvel rez ha loc'h
- *homochromie fixe et homochromie mobile* arunliv fest hag arunliv keflen
- *immobiliser un foyer de fracture* diloc'hekaat ur sezenn dorradur
- *les os des doigts sont très mobiles* hefiñ kenan eo eskern ar bizied
- *lésions cutanées serpigneuses et mobiles* anafoù kroc'hen aremstlej ha dilec'hiat
- *limitation de la mobilité de la rotule* amheloc'h ar padellek
- *maintenir et immobiliser les fragments d'un os fracturé* derc'hel diloc'hek an tammoù eus un askorn torret
- *micro-organismes mobiles* korvevion andeat
- *mobilisation dentaire* distrantelled an dent
- *mobilisation forcée* darfiñverezh
- *mobilité anormale (manque de fixation) entre le crâne et la face* digenfest ezreol ar c'hloppenn hag an dremm
- *prothèse dentaire mobile* dentosod heloc'h
- *polyarthrite douloureuse, mobile* liesarzfo laurek, dilec'hiat
- *réduction et contention des fractures* diren ha disloc'hañ an torroù
- *rendre la mobilité à une articulation ankylosée* adloc'husaat ur c'henvell tromaotek
- *suppression chirurgicale de la mobilité d'une articulation* lemel ent surjaniel loc'husted ur c'henvell
- *syndrome des cils immobiles* azoniad ar blevanoù difiññ
- *volume respiratoire mobilisable* ec'honad analadel deloc'hadus (sl. (-)mot-, (-)motr-, mouv-).

modelage ◇ **modeling** ◇ **gouzelviñ** Kalvezder leuñviñ, anezhañ ur mezañ lec'hiek.

(-)model(-), modèle, modél-

- *interconnexions établies sur le modèle de celles du cerveau* etrekennaskoù trevnet diwar batrom re an empenn
- *modelage prothétique ou non d'un anneau orificiel du cœur* gouzelviñ gwalenn ur gwask eus ar galon diwar-bouez un osod pe hep osod
- *modèle* patrom, patromenn, delvan
- *modèle de données* delvan roadennoù
- *modeler chirurgicalement l'isthme de l'aorte rétréci* par une coarctation azneuziñ surjaniel strizh an aortenn enkaet gant ur goudag
- *modéliser* delvanañ
- *remodelage chirurgical de l'os alvéolaire après une avulsion dentaire* azneuziñ surjaniel askorn al logig goude digewanañ an dant
- *théorie des modèles* damkaniezh an delvanoù, delvanouriezh
- *tige métallique modelée sur la face vestibulaire des couronnes dentaires* garenn vetal darstummet diouzh talbenn arakkambr kurunennoù an dent.

modéré

- *augmentation modérée du taux de macroglobuline* usvec'h argrenn ar makro-globulin
- *hyperglycémie modérée* gwadusvec'h glukoz argrenn
- *ictère modéré* ikter amzoues
- *mouvement complet contre une résistance modérée* fiñvadenn glok ouzh un harzerezh amgreñv
- *tuméfaction modérée de la rate et des ganglions* koeñvadur argrenn ar felc'h hag ar gwerblennoù.

modulation ◇ **modulation** ◇ **goulazañ, gouluzerezh g.** Ober argemmañ da wered un arc'hwel a-geñver gant un arc'hwel all, sk. : *goulazañ borc'herezh un hormon*.

modulateurs hormonaux ◇ **hormon modulators** ◇ **gouluzerioù hormonal** Danvezzennoù o taskemmañ gwered ar borc'h-erioù hag ar buzerioù hormon; berzet int gant an *Aozadur Bed Eneppistañ* (*World Anti-Doping Agency*).

moelle, TA medulla ◇ **marrow** ◇ **mel g.** Parzh kreiz, blot, organoù 'zo : 1) *m. an eskern* (TA *m. ossium*, Gl. *m. osseuse*), gwriad loet e diabarzh an eskern, anezhañ daou stumm : a) ar *m. ruz*, o chom bezant en eskern spoueek en oadour, zo un organ

gwadparañ ha hangaeñ; *b*) ar *m. melen*, o c'henniñ kavenn ar mel eus treuzennoù an oadour, zo un danvezenn dic'henezhadel; 2) ar *m. alivenn* (TA *m. spinalis*, Gl. *m. spinale* pe *épinrière*), lodenn an nerved loet e-barzh kanol ar mellkein; 3) an *hirvel* (TA *m. oblongata*) (sl. *bulbe rachidien*).

moelle : syndrome de compression de la ~ ◇ **syndrome of compression of the spinal cord** ◇ **azoniad amwask ar mel a-livenn** Teskad an erzerc'hadoù oc'h anadiñ ent argammedek e dianlen amwask ar mel a-livenn gant ur c'hleñved Pott, ur yoc'henn vellennel pe enlivennel, anezho da gentañ arouezioù gwriziennel, da c'houde un azoniad Brown-Séquard, erfin un treuzseizi dasstrizhek (sl. *Brown-Séquard : syndrome de ~*, *Pott : mal de ~*).

moelle : syndrome de section complète de la ~ ◇ **syndrome of total transverse lesion of the cord** ◇ **azoniad peurvoulc'h ar mel a-livenn** Teskad an erzerc'hadoù dec'hanet gant un odead (gloazad, gwadliñv enmelel, argrad) e stiradoù a-livenn ar mel, anezho un treuz-pe ur pevarseizi gwak, klok, kevret gant anadennoù bleuzel o tarvezout trumm, steuz an damougoù a-stirenn, aneraez klok, strafuilhoù ar c'helc'hstrishaerioù ha displeberadur an deñvegezh; mar dreistbever ar gouziviad, dindan un nebeut sizhuniou e tinod an dargrezañ hag an damougoù a emgefren melel; e tro un argrad, alies e tedro buan war well an daolenn glinikel.

mogigraphie ◇ **mogigraphia** ◇ **brezorn g.** Dasstrizh a zarvez gant an dorn pa skriver, pa c'hoarier ur benveg sonerezh, h.a. (sl. *crampe des écrivains*).

mogilalie ◇ **mogilalia** ◇ **breuz g.** Bec'h o tistilhañ leñvennoù 'zo.

mogiphonie ◇ **mogiphonia** ◇ **brevouezh g.** Strafuilh ar mouezhparañ o tizhout michereion ar gomz hag ar c'han, anezhañ an dic'halloud da ec'hodiñ sonioù a ser gant anglevad ar savn stardet bewech ma stager da brezeg; war un dro e noter un delaosk eus plegoù ar vouezh.

moi, ego ◇ **ego** ◇ **me g., ego g.** Ensav diforc'het gant Freud (Al. *Ich*), en e eil arlakadenn eus ar benvegad bred, diouzh ar se (Al. *Es*, Sz. *id*, Gl. *ça*) hag an *dreistme* (Al. *Über-Ich*, Sz. *super-ego*, *superego*, Gl. *sur-moi*, *surmoi*); ar me a rank dere'hel kont eus an amvezioù diavaez, talañ ouzh arc'hadurioù ar se (al luzadoù) hag ouzh darvennadoù an *dreistme*.

moignon ◇ **stump** ◇ **1 moñsens b. 2 skarvenn b.** 1 Parzh eus an ezel bet ambidet, loet etre ar gleizenn hag ar c'henvell a zo diouzhtu a-us. 2 Parzh eus un organ a zo bet lamet ul lodenn anezhañ, sk. *skarvenn un dant* (Gl. *moignon dentaire*), *skarvenn ar c'hreuz* (Gl. *moi-gnon gastrique*).

molaire¹ ◇ **molar** ◇ **˘mol, molel aa.** A-zave d'ar mol; an *tolz mol* (Gl. *masse molaire*) zo tolz ur mol eus un danvezenn; an *dileizhenn volel* (Gl. *solution molaire*) zo enni ur mol dre litr.

mol-

- *coefficient d'extinction molaire* gwezhiader mougañ molel
- *concentration molaire du soluté en moles par mL* bec'h mol/mL eus an dileizhad.

molaire², TA dens molaris ◇ **molar** ◇ **kildant** (l. : **kident**), **maler g. -ioù** Dant outañ lies gwrizienn ha lies broud (liessikek ha liesbroudek), loet adreñv ar rakvalerioù, a zo e arc'hwel breviñ ar boued (sl. *canine, incisive*).

mol-

- *béance molaire* amgeharz kildentel.

môlaire ◇ **molar** ◇ **môlel aa.** A-zave d'ur môl hidatiform.

molal ◇ **molal** ◇ **molal g.** Unanenn molder tolzel, par d'ur mol danvezenn dre 1 000 g dileizhuzenn.

molalité ◇ **molality** ◇ **molder g. tolzel, tolzvec'h g. mol** Bec'h ur c'horf war zileizh dewerzhed dre niver ar moloù dileizhet dre 1 000 g dileizhuzenn (sl. *mole, molal, molarité*) (sl. GEFIZ 91, 192).

molarité ◇ **molarity** ◇ **molder ec'honel, ec'honvec'h mol** Bec'h ur c'horf war zileizh dewerzhed dre niver ar moloù dileizhet dre litr dileizhenn (sl. *mole, molalité*) (sl. GEFIZ 91, 192).

mole ◇ **mole** ◇ **mol g.** Unanenn tolz mol molekul, tolz $6,022 \times 10^{23}$ molekul (tolz Nad molekul) eus un danvezenn (sl. GEFIZ 116).

môle, môle hydatiforme ou vésiculaire ◇ **mole** ◇ **môl g. hidatiform pe c'hwezigennek** Gwechall, anv roet da gorfoù diseurt ezvountet gant ar grozh : fibromiomoù, polipoù, kaouledennoù daskemmet, h.a.; hiziv e strishaer erdal an termen d'un dic'henezhad kistel eus bodennoù ar c'horion e stumm un tolpad c'hwezigennoù bihan kenstaget diwar-bouez edañvoù munut ha gronnet ebarzh ur gennenn; kuñv peurliesañ, dibaot e tarvez d'ar môl treiñ e koriokarkinom (sl. *chorio-adénome destruens, chorio-épiphéliome*).

Moll : glandes de ~, TA glandulae ciliosis ◇ **Moll's glands** ◇ **gwagrennoù ar malgud** Gwagrennoù c'hwezpar kernezvorc'hat loet e ribl rez ar malvennoù etre bolc'henoù blevsoavel ar malgud.

mollet, TA sura ◇ **calf** ◇ **kof gar** Lodenn gigekek balirek eus parzh adreñv ar c'har.

molluscum g., naevus molluscum g. ◇ **molluscum** ◇ **molluskom g. -où, molluscum g., naevus molluscum** Yoc'henn stirek ha bourr eus ar c'hroc'hen, seurtad nevuz kenglenel, dezhi meur a stumm : pe plat ha ledan, pukadus d'an teuta, pe balirek, troadennek zoken (*molluscum pendulum*); he ment o vont eus ar penn spilhenn d'an orañjezenn (*fibrom molluscum*); deskriet e vez molluskomoù kalet hag ulmennek (*neuromoù plezhadek*); bezant e vez ar molluskomoù e kleñved Recklinghausen hag e skleroz torosennek Bourneville (sl. *névrome plexi-forme, sclérose tubéreuse du cerveau*).

molluscum contagiosum, acné varioliforme ◇ **molluscum contagiosum** ◇ **molluscum contagiosum g., akne b. vrec'hvanek** Yoc'henn epitelem kuñv a vent gant ur berlezenn, tredizhus dre unanenkoriñ, kiriek dezhi ur *Poxvirus*, enni ur yodenn arwenn ezvountadus dre un ampukenn en he c'hreiz; sezañ a ra war ar fas (malvennoù), ar c'hef hag ar rannbarzh fraezhganadel.

NOTENN : E lavar mezegel meur a yezh ez eus treuzpadet un niver termenou latin; evit ar brezhoneg e kinnigomp an diskoulm-mañ : pa na saver ket kevatalioù du-mañ, amprestañ ar furm latin, gwech dezneuziet he skrivadur, sk. : *molluskom*, gwech andezneuz, dreist holl pa vez liesger an amprest, sk. : *molluscum pendulum*.

momification ◇ **mummification** ◇ **krebac'hiñ, krebac'hidigezh b.** 1 (Naouedouriezh) rizh marvennañ sec'h a stader gant furmoù 'zo eus ar breinged (sl. *gangrène*). 2 (Mezekniezh lezennel) disec'hañ o tarvezout gant gwiadoù ha flugez ur c'helan hervez amveziadoù 'zo hinadel (broioù tomm ha sec'h) ha priadel (douaroù traezhek); dre ar c'hrebac'hiñ e vez gwarezet ar c'horfoù ouzh ar breinañ — ur c'hrebac'hiñ kalvezadel eo ar *balzamegñ*, alese an arver a reer a-wechoù eus an termen-mañ en testennoù mezegel evit menegiñ ar c'hrebac'hiñ 3 (Amiegouriezh) disec'hañ ur grouell varv hag azgannet er grozh d'un ampoent kentrat eus ar vec'hiegi, anezhi a-wechoù ur gevell o venel er grozh hag o vezañ ezvountet e koulz war un dro gant e vreur bev (sl. *fœtus compressus*).

Monakow : syndromes de von ~ ◇ **Monakow syndromes** ◇ **azoniadoù Monakow** 1 Azoniad dustaat e dianlen un anaf e golo un troad a 'n empenn, anezhañ, agendu d'an anaf, seizi nervern loc'hañ al lagad hag, a-eiltu, ul ledc'houseizi, ul ledaneraez ha loc'hadoù koreoatetozek. 2 Azoniad diwar dizhad an dalmerenn dolgennek (barr a-gavaz ar garotidenn diabarzh), anezhañ, a-eiltu, ul ledseizi bloc'hek hag ingal, ul ledaneraez argrenn hag ul ledangwel (sl. *choréo-athétosique : mouvements ~s, chorôidien : syndrome de l'artère ~ne antérieure*).

Monbrun-Benisty : syndrome de ~ ◇ **Monbrun-Benisty syndrome** ◇ **azoniad Monbrun-Benisty** Seurtad goriaz an dremm oc'h anadiñ a-wechoù un nebeut mizioù goude ur gloazad al lagad hag ar poull lagad, naouus dre ul laur drek-lagad o saezheniñ etrezek ar c'hilpenn, ur gwazhiedfrankaat er fas, c'hwezusorc'h hag uc'heraez kroc'hen.

Mönckeberg : maladie de ~ ◇ **sclerosis annularis valvularum** ◇ **kleñved Mönckeberg, skleroz gwalenn ar sac'helloù** Isvoll an trapig aortek diwar ur razekaat arzeuat, dianav e arbenn; deraouiñ a ra ar razekaat war dalbenn aortek ar sac'helloù hag e-barzh an asplegoù anezho, ouzh o barrañ en ur lezel rez ar ribloù (sl. *médiacalose*).

Mondor : maladie de ~ ◇ **Mondor disease** ◇ **kleñved Mondor** Tromboz en ur wazhienn diavas eus speur araok-kostezel ar brusk, naouus dre un deroù manguñv, hep arbenn da welout, dre ur funell wazhiennel argalet laurus hag ar pare a-benn un nebeut sizhunvezhioù.

Monge : maladie de ~ ◇ **Monge disease, Andes disease** ◇ **kleñved Monge** Elruz henek e dianlen ur chomadenn hir en uhelder, anaez stadet e poblañs krec'hdaolioù uhel an Andez, gougemeret mat peurliesañ.

mongolique, mongolien, mongoloïde ◇ **mongolic, mongolian, mongoloid** ◇ **mongolek aa., mongolian aa., mongoloïdel aa.** Termenoù arveret en Denoniezh hag er Yezhoniezh a-zivout kenelioù 'zo eus Azia; dilezet eo an arver er Gleñvedouriezh eus deveradoù diwar ar stirann *mongol-* (sl. *Klotz : syndrome de ~, tache aveugle : syndrome de la ~, trisomie 21*).

monilethrix, syndrome de Sabouraud ◇ **monilethrix, Sabouraud syndrome** ◇ **moniletriks g., azoniad Sabouraud** Anaez hêrezhel treuzkaset er mod trec'hek, o tizhout ar blevognon, erzerc'hat e-kerz mizvezhioù kentañ ar vuhez dre un diwaoutad diwezhel klok pe damglok; goloet eo ar brigenn gant tosennoù bihan damroz, bolc'hennek, hag ar briger, hedorr, zo dezho un neuz volbousek.

moniliforme ◇ **moniliform** ◇ **bolbousek aa.** A-zivout ur ganol, ur funell, ur vlevenn a zo warno ur steudad strishaennoù o laka heñvel ouzh ur chapeled pe un dro c'houzoug perlez.

moniteur ◇ **monitor** ◇ **gouarnier g. -ioù** Ardivink elektronek amkanet da evshaat ar glañvourion en unvezioù arouelañ rennek, dre wereañ war un hewel ar c'halonvarrwezad, gwask ar gwad er gwazhied, korvez an analañ, h.a., ha da arfraouiñ pa bella al lerc'hwezadoù diouzh ar reolded.

monitorage ◇ **monitoring** ◇ **gouarneriañ** Araezad evshaerezh ar glañvourion diwar-bouez ur gouarnier (sl. *moniteur, télésurveillance*).

monoamine ◇ **monoamine** ◇ **monoamin g. -où** Stroll aminoù ouzh e ober ar serotonin hag ar c'hatekolaminoù (dopamin, adrenalin, noradrenalin); gwezhet e vez an ec'haozañ kennevidel anezho dre araez daou enzim : ar c'hatekol-O-metiltransferaz hag ar monoamin-oksidaz (MAO); pouezus e ve o roll bevedourel e par steuñvenn louet an nerved kreiz evit a sell reoliñ an eniñv ha gougevaniñ ar struzhelezh ouzh ar c'hemoned.

monoamine-oxydase, MAO ◇ **monoamine oxydase, monoaminoxydase, MAO** ◇ **monoaminoksidaz, MAO** Enzim o tasperzhiañ en ec'haozañ ar monoaminoù, daou seurtad anezhañ : ar *MAO A*, oc'h eznevidañ a-ziz an noradrenalin, ar *MAO B*, oc'h eznevidañ a-ziz ar feniletilamin hag an triptamin, an daou seurtad oc'h eznevidañ an dopamin.

monoarthritis ◇ **monoarthritis** ◇ **unarzfo g.** Arzfo o tizhout ur c'henvell hepken; *u. disneuzius daraezien* (Gl. *m. défor-mante traumatique*), arzanaez o rouestlañ dedro eilvedel pe goulerc'hat un torr kenvelled pe nes-kenvelled; *u. kernel* (Gl. *m. apicale*) pe *trogerifo* (Gl. *périapexite*), poread er gwiadoù en dro da zibenn gwizienn un dant.

monoballisme ◇ **monoballism** ◇ **unvallegezh b.** Seurtad ledvallegezh kantet en un ezel, krec'h pe traoñ (sl. *hémiballisme*).

- monoblastes** ◇ **monoblasts** ◇ **monoblast** s. Kelligoù bras anhoskat evit d'o c'hraoñell bezañ krouizek, bazennel o frotoplasm, bezant er mel eskern, oc'h evodiñ eus ar bongelligoù hag o tisoc'h gant ar promonokit; diaes e vezont da ziforc'hiñ diouzh kelligoù yaouank eus ar steudad granulokitel (sl. *cellules souches, granulocytaire : lignée pe série* ~).
- monocaténaire** ◇ **single stranded** ◇ **unarrevell** aa., **unwidenn** aa. Dezhañ un arrevell hep mui, sk. : *unarrevell eo an RNA kannad* (sl. *brin, ribonucléique : acide* ~).
- monochorée** ◇ **monochorea** ◇ **unkorea** g. Fiñvoù koreek kantet en un ezel (sl. *chorée, hémichorée*).
- monochromate** ◇ **1 monochromatic 2 monochromat** ◇ **1 unarneuelek** aa. **2 unarneueleg** g. **-eion** 1 Na wel kemm ebet etre al livioù, o verzhout an holl e rezh an un arne. 2 Gouziviad an unarneuel (sl. *achromate*).
- monochromatopsie** ◇ **monochromatism** ◇ **unarneuel** g. Dic'halloud enganet pe arzeuat da ziforc'hiñ al livioù, ar gouziviad o verzhout war bep tra an un arne louet (sl. *achromatopsie*).
- monoclonal** ◇ **monoclonal** ◇ **monoklonel** aa. A-zave d'an un klon; en hangawadouriezh, e lavarar monoklonel an immunoglobulin naous dre ur pik strizh e krommenn dredannizhañ ar proteinoù, lun naous da neridigezhioù yud 'zo evel *makroglobulinemiezh hennadek Waldenström* (sl. *macroglobulinémie*).
- monoculaire** ◇ **monocular, unioocular** ◇ **unlagadel** aa. A-zave d'ul lagad hepken, sk. : *gweled unlagadel*.
- monocytaire** ◇ **monocytic** ◇ **1 monokitel** aa. **2 monokitek** aa. 1 A-zave d'ar monokit, sk. : *steudad monokitel*. 2 Azonet dre an usriñv monokit, sk. *gorank monokitek* (Gl. *angine monocytaire*).
- monocytaire : lignée** ou **série** ~ ◇ **monocytic series** ◇ **ac'had** g. pe **steudad** b. **monokitel** Steudad kelligoù oc'h emdreñ adalek bongelligoù ar mel eskern betek ar monokit hag ar makrofag gwiadell en ur dremen dre ar furmoù monoblast ha promonokit.
- monocytes** ◇ **monocytes** ◇ **monokit** s. Anvet ivez *mononuklear bras* (Gl. *grands mononucléaires*), ar re vrasañ eus al leukokit (12 da 25 µm treuzkiz), dezho ur graoñell favennek hag ur protoplasm karget gant greunennadoù munut azulen; evodet er mel eskern diouzh ar monoblast hag ar promonokit, e tremenont dre ar gwad, ma 'z eont d'ober ent reol etre 4 ha 10 % eus al leukokit, hag alese d'ar gwiadou ma troont e makrofag a 'r reizhiad retikuloendotelel ha, dreist holl, a 'r reizhiad fagokit mononuklear (Gl. *phagocytes mononuclés, Sz. mononuclear phagocytes*).
- monocytopoïèse** ◇ **monocytopoiesis** ◇ **monokitparañ** Furmiñ ar monokit, o c'hoarvezout er mel eskern.
- monocytose** ◇ **1 normal monocyte count 2 monocytosis** ◇ **1 monokitriñv** g. **2 monokitusriñv** g., **elvonokit** g., **monokitoz** g. 1 Feur ar monokit er gwad (ent vonan e tro 500 dre mm³). 2 Reñver monokit er gwad, pa sav o feur dreist 1 500 dre mm³ pe 12 % eus al leukokit; stadet berrbad da geñver an holl gleñvedoù lemm (peurgetket an tifoid, an enkalonennfo poreel, an terzhiennoù dispuilhadek) hag un nebeut anaezioù henek (ar baludegezh, an derzhienn arreadek, furmoù 'zo a leukemiezh) (sl. *mononucléose infectieuse*).
- monomèle** ◇ **monomelus** ◇ **1 ledarzheladek 2 ledarzheladeg** g. **-eion** 1 Gant al ledarzhelad. 2 Gouziviad al ledarzhelad (sl. *avortement* 2).
- monomélie** ◇ **monomelia** ◇ **ledarzhelad** g. Ezvezañs c'hanedigel unan eus an izili krec'h pe draoñ (sl. *ectrogénie*).
- monomérie** ou **hérédité monomérique** ou **monofactorielle** ou **unifactorielle** ou **monogénique** ◇ **monogenic inheritance** ◇ **ungenhêrezh** b. Treuzkas hêrezhel un doareenn dre araez ur c'henenn drec'hek pe ur re c'henennoù enkilek nemetken.
- monomérique** ◇ **monomeric** ◇ **1 ungenhêrezhek** aa. **2 ungenhêrezhel** aa. 1 Perzh an treuzkas dre ungenhêrezh. 2 A-zave d'an ungenhêrezh.
- mononeuropathie** ◇ **mononeuropathy** ◇ **unnervennaoued** g. Anaez o tizhout un nervenn hepken.
- mononévrite** ◇ **mononeuritis, mononevritis** ◇ **unnervennfo** g. Tanijern un nervenn drobarzh.
- mononucléaires** ◇ **mononuclears** ◇ **mononuklear** s. Leukokit eus an ac'hadoù limfokitel ha monokitel, bet roet dezho hevelep anvad evit o c'hevenebñ ouzh an ac'had bet anvet "polinuklear" (*polynucléaires*) (sl. *granulocytes*); tri seurtad zo anezho : al limfokit (sl. *lymphocytes*), ar *mononuklear krenn* (Gl. *moyens monocytes*), dezho etre 10 ha 15 µm treuzkiz, ar *mononuklear bras* pe *monokit* (sl. *monocytes*); *mononuklear bras glazik* (Gl. *grands monocytes bleutés*) a reer eus limfokit dedroet, a vent vras, a stader en azoniadoù mononuklezel.
- mononucléose** ◇ **mononucleosis** ◇ **1 mononuklearusriñv, elvononuklear** g. **2 mononukleoz** g. 1 Reñver monokit er gwad. 2 Pore diwar viruz Epstein-Barr azonet gant reñver ar monokit er gwad.
- mononucléose chronique : syndrome de** ~ ◇ **chronic mononucleosis syndrome** ◇ **azoniad ar mononukleoz henek** Seurtad pore dibaot diwar viruz Epstein-Barr, o padout mizvezhioù ha bloavezhioù, naous dre ezrelderioù an hangae dourennel ha kelligel kevret gant erzerc'hadoù diseurt : usvent an avu, ar felc'h hag ar gwerblennoù, avufo henek, skeventfo entremezel, azoniad ar misug, gwazhiedsaefo.
- mononucléose infectieuse** ◇ **infectious mononucleosis** ◇ **mononukleoz poreel** Anaez terzhiennek o tizhout an dud yaouank, e azonoù pennañ (oc'h anadiñ goude ur gounervezh etre 4 ha 7 devezh) o vezañ ur gorank, angreizhek a-wechoù, ul liesc'harrenn, ur felc'husvent, hag ur gwennestrard rizhek : usriñv leiek al leukokit gant ur feur uhel mononuklear bazennel

(limfokit T a yelo da zispenn al limfokit B poreet gant ar viruz, sl. *cellules immuno-compétentes*) hag un dazgwered Paul-Bunnell-Davidson yaek; dedreñ a ra d'ar pare dindan un nebeut devezhioù o lezel un hangae padek war e lerc'h; arbenn ar c'hleñved eo viruz Epstein-Barr, eus kerentiad an *Herpesviridae*.

mononucléosiques : syndromes ~ ◇ **mononucleosis syndromes** ◇ **azoniadoù mononukleozel** Stroll kleñvedoù : mononukleoz poreel, kleñved an ebarzhennoù kitomegalek, toksoplasmoz, ruzig, kleñvedoù 'zo viruzel (HIV) ha bakteriell, pistriadoù liael, boutin etrezo daralladur al leukokit, usriñvek e gounid ar mononuklear, distummet ul lod anezho : bras, direoliek, ezkreizek o c'hraoñell, glazik ha bazennell o c'hitoplasm.

monophasé ◇ **single phase** ◇ **unkoulz** aa. A-zivout ur red tredan pebeilat porzhet dre ul linenn divneudenn, a-gevenep d'ar red tric'houlz o rekizañ lies linenn diskoulzet.

monophasique ◇ **monophasic** ◇ **unkoulzek** aa. A-zivout un hilastaler euvriñ o tilaoskiñ ingal an un doead hormon e-doug ar prantad m'en kemerer.

monophthalmie ◇ **monophthalmia** ◇ **unlagadegezh** b. Ezvezañs c'hanedigel (arzhelad) ul lagad (sl. *anophthalmie, avortement 2, borgne, ectrogénie*).

monoplégie ◇ **monoplegia** ◇ **unseizi** g. Seizi o tizhout un ezel pe ur stroll kigennoù hepken.

monorchidie ◇ **monorchism** ◇ **unklidennegezh** b. Bezañs ur glidenn hepken er gousac'h, eben o vezañ anhelouer (chomet e darn he diorreadur) pe amzehentat (chomet e darn an diskenn anezhi).

monosome ◇ **monosome** ◇ **monozom** g. -où Kromozom digenvezet diouzh ar c'heveleb a ya gantañ d'ober ur re; degouezh reol evit ar c'hromozomou revel er gametoù goude ar meioz; ent ezreol, disoc'h ur gouskoevad kromozomel (sl. *aberration chromosomique*).

monosomie ◇ **monosomy** ◇ **monozomiezh** b. Anaev diwar ur gouskoevad kromozomel naoues dre ezvezañs unan eus kromozomou ur re, an holl reoù all o vezañ reol; ezreolder o tarvezout pe war ur gonozom (sl. *Turner : syndrome de ~*) pe war un aotozom (sl. *caryotype*); *m. darnel* (Gl. *m. partielle*) a reer eus dilead brec'h ur c'hromozom (sl. *délétion*), sk : *kleñved garm ar c'hazh* (Gl. *maladie du cri du chat*), teskad kammneuziadoù kreudel ha bredel ageñver gant dilead brec'h verr ar c'hromozom 5.

monosporiose ◇ **monosporiosis** ◇ **monosporioz** g. Anaev a 'r c'hroc'hen hag a 'r glaourgennoù peurliesañ, diwar ur foue eus ar genad *Monosporium*.

monosymptomatique ◇ **monosymptomatic** ◇ **unazonek** aa. Oc'h erzerc'hañ dre un azon nemetken.

monosynaptique ◇ **monosynaptic** ◇ **unsinapsel** aa. O taveñ d'ur sinaps hepken (sl. *réflexe m.*); *prouad u.* (Gl. *test m.*) studi live broudadusted an neuron loc'hañ dre fraouaat tredanel ar forzh degasat hag e se delankañ damougou unsinapsel.

monothérapie ◇ **monotherapy** ◇ **unkurañ** Prederiañ diwar-bouez ul lia pe ur c'halvezder hepken.

monothérapique ◇ **monotherapeutic** ◇ **unkuradel** aa. A-zave d'an unkurañ, sk. : *arver unkuradel ul lia*.

monotriche ◇ **monotrichous** ◇ **unvlevan** aa., **monotrik** aa. A-zivout ur seurtad bazhilli outo ur blevan kreniat en ur penn anezho.

monovalent ◇ **monovalent** ◇ **unwerc'hek** aa. A-zivout ur gwadvez yac'hadel pe ur vaksin prientet dre araez ur ouennad garvegin ha gwerc'hek ouzh an anaезioù devoudet ganti hepken.

monoxyde de carbone ◇ **carbon monoxide** ◇ **monoksidenn b. garbon** Oskidenn garbon a zelun CO, liñvel en aozioù ordinal ha dic'hwezh, evodet eus loskadurioù diglok, o kediañ gant an hemoglobine aesoc'h eget an oksigen, alese he fistrusted vras (sl. *carboxyhémoglobine, oxycarbonémie*).

monozygote, uniovulaire ◇ **monozygotic** ◇ **unviel** aa. A-zivout gevelled wirion, eleze o tont eus rannadur ezreol an un vi (sl. *jumeaux*); kemm a lakaer etre *a) u. unkorion, unamion* (Gl. *m. mono-chorionique ha monoamniotique*), an daou c'hevell o vezañ loet e-barzh an un amion; *b) u. daougonion pe daouamion* (Gl. *m. dichorionique pe diamniotique*), ar vi o vezañ emrannet abred, e deiz ar frouezhigiñ, ez a an daou rannvi da englenañ diwar-bouez div dorzhienn distag, dezho pep a gorion ha pep a amion; *c) u. allgraohellel* (Gl. *m. hétérocaryote*), pa vez kemmoù etre glad hilel an daou c'hevell, evito da vezañ unviel.

monstre ◇ **monster** ◇ **1 euzhek . 2 euzheg** g. -eion Hinienn bet ganet gant kammneuziadoù muiel, dre reñver, dre ziouer pe dre genstaladur ezreol parzhioù he c'horf; *e. aotositek* (Gl. *m. autositaire*), euzheg daouat, gouest pep hinienn anezhañ da vevañ drezi he unan; *e. arvevat* (Gl. *m. parasitaire*), euzheg daouat, an eil hinienn o vevañ drezi he unan, tra ma vev eben diwar he c'houst; *e. unat* (Gl. *monstre simple pe unitaire*), euzheg ampart gant elfennoù eus un hinienn hepken (sl. an termennoù o teraouiñ dre *téra-*).

monstruosité ◇ **monstruosity** ◇ **euzhegezh** b. Anvad genadel ar "gwariadurioù a rizh spesadel, kemplezh, grevus kenan, mezhat, oc'h anadiñ en diavaez ha kengañ" (I. Geoffroy St-Hilaire).

Monteggia : fracture ou **lésion de ~** ◇ **Monteggia fracture** ◇ **torr Monteggia** Torr an helmo er poent etre an trederennoù krec'h ha kreiz, kevret gant un disvellad pennig-gwerzhid war raok hag un disterig war ziavaez, stadet war ar vugale dreist holl.

Montenegro : intradermoréaction de J. ~ ◇ **Montenegro test** ◇ **prouad** g. **endermel Montenegro** Prouad gwezhiel dre ensklañ en derm douhennadoù alkaliek eus tiñvadennnoù lazhet *Leishmania*; yaek e vez gant gouziviaded al leishmanioz, hag int klañv pe pare.

- Moore** : **prothèse de** ~ ◇ **Moore prosthesis** ◇ **osod g. Moore** Seurtad osod dezhañ ur c'harenn vualierek e Vitallium® a zanverez da amsaviñ penn ha gouzoug an askorn morzhed.
- Moore-Federman** : **syndrome de** ~ ◇ **Moore-Federman syndrome** ◇ **azoniad Moore-Federman** Kevreted dibaot, treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, korreded familhel, reuted ar c'henvelloù hag ezreolderioù lagad (usstiwel, glaokom), kevret a-wechoù gant un avufelc'husvent; an un kleñved e ve *azoniad M-F* hag ar *gorrvleñchegezh* (sl. *acromicrie*).
- Mooren** : **ulcère serpigneux** ou **ulcus rodens de la cornée de** ~ ◇ **Mooren's ulcer** ◇ **angreizh b. aremstlej pe angreizh krignus ar gornsaes** Seurtad dibaot gouliez ar gornsaes o teraoüñ en trobarzh anezhi dre ensiladurioù gwenn arvelen bihan angreizhus oc'h emastenn dilaur etrezek he c'hreiz hag he donder.
- Morax** : **maladie de** ~, **conjunctivite subaiguë** ◇ **Morax-Axenfeld conjunctivitis** ◇ **kleñved Morax, kevresaefo g. goulemm** Kevresaefo naouus dre ruzder ar gevresae en ankoù lagad, kiriek dezhañ diplobazhell Morax, hadenn Gram + eus kerentiad an *Nesseriaceae*.
- morbi-mortalité** : **taux de** ~ ◇ **morbimortality rate** ◇ **feur g. klañvvervel** Dregantad marvoù e-doug ur pad lavaret en ur stroll tud tizhet gant ur c'hleñved, sk. : *f. k.* a-benn ur bloaz goude an oberata war ur c'hankr (sl. *mortalité, mortinatalité*).
- morbidity** : **taux de** ~ ◇ **morbidity rate** ◇ **feur g. kleñvel** Dregantad gouziviaded ur c'hleñved en ur stroll tud e-doug ur pad lavaret.
- morbigène, morbifique, pathogène** ◇ **morbific** ◇ **kleñvedus aa.** O tevoudañ un argerzh kleñvedel (sl. deveradoù diwar *patho-*).
- Morbihan** : **maladie du** ~ ◇ **Morbihan disease** ◇ **kleñved ar Morbihan** Anaez kroc'hen bet stadet an degouezhioù kentañ anezhañ e 1957 e su Breizh, naouus dre un eritem hag ur gouliñv kalet e daoufarzh uhelañ ar fas, sellet evel ur rouestlad dibaot eus an akne livrin, chomet kilvers betek henn ouzh ar prederiadurioù.
- morbilleux** ◇ **morbillous** ◇ **ruzellel aa.** A-zave d'ar ruzell.
- morbilliforme** ◇ **morbilliform** ◇ **ruzellvanek aa.** A-zivout un dispuilhad tiennoù bihan hevonnn damroz, etrezo entremezioù kroc'hen bonan, o tennañ da eritem ar ruzell, sk. : *yazad r.*, Gl. *rash m.* (sl. *eruption, rash*).
- Morbillivirus** ◇ **Morbillivirus** ◇ **Morbillivirus** Genad viruz gant RNA gougevret ouzh kerentiad ar *Paramyxoviridae*, ennañ viruz ar ruzell, viruz kleñved Carré ha, dizoloet agentaou, ar viruz Hendra.
- mordançaçage** ◇ **mordanting** ◇ **divlouñ** Kalvezder er vakteriouriezh hag er wiadoniezh evit kevaraezañ gwered ul livuzenn nad eo ket evit intrañ ur gwiad drezi he unan.
- Morel** : **sclérose laminaire de** ~ ◇ **Morel laminar sclerosis** ◇ **skleroz g. lavnennek Morel** Isteñv an neuron ha skleroz haenadoù 'zo eus pluskenn an empenn, o tizhout alkooleion henek war un dro gant marvenn greiz ar c'horf karnek hag envedi.
- Morel-Lavallée** : **épanchement séreux de** ~ ◇ **Morel-Lavallée effusions** ◇ **fennad g. levrus Morel-Lavallée** Hogennad levruzenn ledet dindan ar c'hroc'hen a stader peurliesañ e par ar vorzhed pe an dargreiz da heul ur c'hwistad a-spin.
- Morgagni** : **cataracte de** ~ ◇ **Morgagni cataract** ◇ **ferennlug g. Morgagni** Ferennlug goulerc'hat, "pezhell" (Gl. "*trop mire*"), stad ar ferenn war-nes liñvennañ e diabarzh he fourc'had; alies ez eus anezhañ ur furm c'hanedigel.
- Morgagni-Steward-Greeg-Morel** : **syndrome de** ~, **craniopathie métabolique, endocraniose hyperostotique** ◇ **Morgagni syndrome, internal frontal hyperostosis** ◇ **azoniad Morgagni, kloppennaez kennevidel, endokranioz g. hyperostozek** Azoniad o tizhout ar merc'hed goude ar paouez mizioù, naouus dre gevreted hiperostoz diabarzh an tal, gourevegezh ha behinegezh, war un dro alies gant direizhoù empennel ha gougorfennel (goursec'hed, mihun, asikted, diabet, strafuilhoù gweledel).
- morgan, morganite** ◇ **morgan** ◇ **morgan g.** Unanenn hed ar c'hromozomoù o klotañ gant ur feur adkevosiñ par da 1; ebarzh ur gantvedenn *m. (kentimorgan, Gl. centimorgan)* e vez tebegezh an adkevosiñ par da 1%; ur c'hentimorgan, a zo an *unanenn adkevosiñ*, a dalvez war-dro 1 000 kilobonhed (sl. *base 3, combinaison*).
- morgue** ◇ **mortuary, morgue** ◇ **kelanva g. -où, kelandi g. -où** Stavell ma talc'her ar c'horfoù goude ar marv da c'hortoz al lidoù diwezhañ (sl. *autopsie, crématorium, funéraire*).
- moria** ◇ **moria** ◇ **moria g.** Strafuilh bredel o c'hoarvezout eus ur c'hemmesk broudedigezh, gourboz, drantiz hag un tech d'ar farserezh, bet deskriet evel naouus da yoc'hennoù tolbezenn an tal.
- Moro** : **réflexe de** ~, **réflexe des bras en croix** ◇ **Moro reflex** ◇ **damoug g. Moro** Damoug kezivik gant an nevezc'hanidi, a laka o divvrec'h e kroaz pa bleger o fenn, p'o dibrader dre an treid pe pa skoer war an daol ma c'hoarvezout.
- morphée, sclérodemie en plaques** ◇ **morphea** ◇ **morfea g., skleroderma g. strewek** Skleroderma hevonnn naouus dre bannennoù aront (*m. plakennek*), dre vandennoù (*m. riblennek*) pe lijoerennoù bihan un nebeut milimetroù treuzkiz (*m. takennek*), elfennoù holl gwenn nakret, argalet, en dro dezho ur wrimenn vouk (Sz. *lilac ring*); *m. lovrezhel* (Gl. *morphée lépreuse*), kleizennoù gwenn pe livegat, aneraezek war lerc'h anaoù al lovrezh.
- morphéique** ◇ **morpheic** ◇ **hunel aa., hun-** O c'hoarvezout pa gousker, sk. : *barradoù hunel* (Gl. *crises morphéiques*), *hundroazhañ* (Gl. *énurésie morphéique*).
- morphine** ◇ **morphine** ◇ **morfin g.** Alkaloid pennañ eus ar roz moc'h, hezer, dic'hoster galloudus ha bader (sl. : *stupéfiant*).
- morphines endogènes, peptides morphinomimétiques** ◇ **endogenous morphines** ◇ **morfinoù endeuat, peptidoù l. (g.), morfingeveler** Proteinoù danzeet gant an empenn diwar amindrenkennoù, en araez da lenañ ouzh buzerioù kelligel ar

morfin bezant e luniadoù empenn 'zo, ganto ur gwered hezañ ha dic'hostañ heñvel ouzh hini ar morfin; daou stroll a reer anezho : an endorfinoù hag an enkefalinoù (sl. *endorphine, enképhaline, neuropeptide, opioïde 2, récepteur morphinique*).

morphinisme ◇ **morphinism** ◇ **morfinegezh** b. Pistriadur lemm pe henek gant ar morfin.

morphinomane ◇ **morphinomaniac** ◇ **1 morfingaezhiat** aa. **2 morfingaezhiad** g. -ed 1 Estoueat ouzh ar morfin. 2 Gouziviad ar morfingaezh.

morphinomanie ◇ **morphinomania** ◇ **morfingaezh** g., **morfingaezhiadezh** b. Bevezerezh boas ar morfin o tec'han an estoue : ezhomm mac'hennek da genderc'hel, stad ezeved diwar an diouer (sl. *addiction, toxicomanie*).

morphinomimétique ◇ **morfin-like** ◇ **morfingevezer** aa. & g. -ioù (Danvezenn) a zo he gweredoù heñvel ouzh re ar morfin (sl. *morphines endogènes, opioïdes*).

morphogène ◇ **morphogen** ◇ **neuseiat** aa. O tesavelañ an neuz.

morphogènese, morphogénie ◇ **morphogenesis** ◇ **1 neuseiadezh** b. **2 neuztarzh** g. 1 Teskad an argerzhioù o tesavelañ neuz ar gwiadoù, an organoù hag ar bevedegoù e-doug o hoali, e ser he arouluniañ hag arouleviañ an dedro anezhi. 2 Rann eus an unandarzh (Gl. *ontogènese*) o plediñ gant diorreadur argammedek neuziadoù ar bevedeg.

morphognosie, gnosie d'extensité ◇ **morphognosia** ◇ **denaoud ar stummoù, denaoud a-erdal** Galloud da hennadiñ ar stummoù dre ar stekiñ (sl. *ahylognosie, amorpho-gnosie, hylognosie*).

morphologie ◇ **morphography, morphology** ◇ **1 neuziadoniezh** b. **2 neuziadurezh** b. **3 neuziadur** g. 1 Diskiblezh hollek o studiañ an neuziadoù. 2 Studi ha deskrivadur stummoù ar bevedegoù, en teir diskiblezh : korfadurezh, gwiaoniez, rizhelloniezh. 3 Kefluniad un ergoren : molekulenn, kellig, gwiad, organ, bevedeg (sl. *anatomie pathologique, déformation, malformation*).

morphométrie ◇ **morphometry** ◇ **neuzventerezh** g. Muzulierezh neuziadoù an ergorennoù.

morphotype ◇ **morphotype** ◇ **neuzrizh** g. Rumm ma vez renket un hinienn hervez he neuziadoù.

Morquio : maladies de ~ ◇ **1 Morquio disease** **2 Morquio syndrome** ◇ **1 kleñved Morquio** **2 azoniad Morquio** 1 Tolc'had kentez-kofig ganedigel, kevret peurliesañ gant ur gammneuziad (kehentad etre-kentezoù izel pe etre-kofigoù) pe gant ur yoc'henn en dilhenn. 2 Anaez eus stroll ar mukopolisakaridozioù oc'h erzerc'hañ, kerkent ma krog ar bugel da vale, dre fontidigezh al livnenn gein, berdrer ar c'hef ha korreded da heul pladadur korf ar mellennoù, rakvaliregezh ar gleren, gouzisevellad an divlezh ha daoulin ezkromm, a-wechoù rouestladoù nerval dre amwask ar mel; e-touez an nammedoù all : baliregezh parzh izelañ atel ar fas, ezreolderioù en dent, demerennoù er gornsa, isklev, skorted an aortenn, usdioul mukopolisakaridoù trenkek; kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek.

Morris : point de ~ ◇ **Morris point** ◇ **poent Morris** Poent loet 4 cm diouzh ar begel war al linenn etre ar begel hag ar spermenn glun araoek uhelañ dehou, laurus ar pouezañ warnañ pa vez bestlgellenfno.

mort ◇ **death** ◇ **marv** g. Astal diwezhe holl arc'hwelioù ar beved; ar re-mañ avat ne baouezont ket holl war un dro en holl wiadoù hag en holl organoù; a-henvoaz e tisklerier ez eo marv un den adal ma stader gantañ steuz ar genskiant, ar fiñval, an eraeziañ hag an erwezhañ ouzh nep fraouaat, arsav an amredañ hag an analañ hag ur mabusvoll padek; gant treuzplanterezh an organoù avat hag ar ret merkañ ent lezennel ar pred ma erlamer an imboudenn, e voe ranket sevel un despizadenn resisoc'h; a-unan e voe mezeion, lezennourion ha teologourion evit kevazañv ez eus un heveleb eus marv an empenn ha marv an den; despizet eo *marv an empenn* evel ar paouez hollek ha diwezhe eus holl arc'hwelioù an empenn (en o zouez re ar c'hef empenn); ent embregel e vez haeret marv an empenn pa ziraez ar gouziviad stad an *trac'homa* (Gl. *coma dépassé*) pe *koma andizhek*, testet pe gant un empennvarwezad plat e-doug 30 munud ha gwezhet un eil gwech 4 eurvezh goude, pe gant ur gwazhiedluniñ oc'h anataat paouez amred ar gwad an empenn (sl. *coma dépassé*).

mort apparente ◇ **apparent death** ◇ **marv hañvalat** Astal an arc'hwelioù analañ hag amredañ war un dro gant koll ar genskiant; astal a c'hell bezañ *dibad*, ent emdarzh pe dre wered an embregoù defraouiñ, pe diwezhe : ar marv gwerc'hek.

mort cérébrale ◇ **cerebral death, brain death** ◇ **marv a 'n empenn, marv empennel** Termen bet ergemennet ent kefridiel e 1988 evit deanviñ ar c'homa dieiltro (sl. *coma dépassé*).

mort encéphalique ◇ **encephalic death** ◇ **marv a 'r mel penn, marv melpennel** Termen erlec'hiet ouzh *mort cérébrale* en askont d'ar c'hemm a lakaer etre ar *mel penn*, ouzh e ober an empenn, an ilpenn hag ar c'hef empenn, hag an *empenn* ent strizh, anezhañ al lodenn eus ar mel penn loet dreist telten an ilpenn, diforc'h hemañ rekizet gant divizoù lezennel da erlamerezh an organoù amkanet d'an treuzplantañ (sl. *cerveau, encéphale*).

mort naturelle ◇ **natural death** ◇ **marv naturel** Andizh darvezet evel an disoc'h eus dedro ur c'hleñved pe evel dibenn ar gozhni; digemmet e vez ar *m. n.* diouzh an andizhoù dre emlazh pe dre goul, e dianlen devoudoù brezel ha darougadoù, darvoudoù ar gedvuhez hag ar c'hehentiñ, gourmestoù greantel ha dirfeudoù naturel.

mort subite inexplicquée du nourrisson ◇ **sudden infant death** ◇ **marv trumm andispleget ar vagadell** Andizh diadarzh ur vagadell yac'h betek eno, o tarvezout dre he c'houk, degouezh paot a vervent ar vugale; dianav e chom an arbenn anezhañ.

mort suspecte ◇ **suspect death** ◇ **marv gouselladou** Andizh anskardus e arbenn etre ur marv naturel hag un denlazh, devredet pe nann.

mort violente ◇ **violent death** ◇ **marv arialek** Andizh darvezet e disoc'h ur blegenn feuls; hervez an amveziadoù e tiforc'her : a) ar *m. a. dre emlazh* (Gl. *m. v. suicidaire*), b) ar *m. a. darvoudel* (*m. v. accidentelle*) pa na vez den kiriek dezhañ, c) ar *m. a. fell-*

adannel (Gl. *m. v. délictuelle*), dre zenlzh andevred (darvoud an hentred da skouer), *d*) ar *m. a. koulel* (Gl. *m. v. criminelle*), o tisoc'h eus taolioù ha gloazioù azevred hep mennad da lazhañ, pe eus un denlzh devredet gant pe hep rakpoellad (sl. *obstacle médicalégal au permis d'inhumer*).

mort-né ◇ **stillborn** ◇ **1 marvc'hanet** aao. **2 marvc'haned** g. -**idi** Bugel bet ganet marv kent analañ; e-keñver an diskleriañ marilhel, e tiforc'her ar vugale *bevc'hanet ha bevus* (goude un termen 22 sizhunvezh mizanliñv pe dezho 500 g tolz izek — ABY, 1977) hag ar vugale *marvc'hanet* (goude 28 sizhunvezh mizanliñv); *marvc'henel* (Gl. *accouche-ment d'un enfant mort-né*, Sz. *stillbirth, dead birth*) (sl. *mortalité, viabilité*).

1 2 3 mortalité 4 5 (taux de) mortalité ◇ **1 2 3 mortality 4 5 mortality rate, death rate** ◇ **1 marvezh b., marveliezh b. 2 marvusted b. 3 mervent g., merventi b. 4 feur mervel 5 feur marvusted** 1 Aoz ar bevion, tonket da vervel. 2 Araezusted da zevoudañ ar marv. 3 Hollad tud o vervel ne vern pezh arbenn 've (kozhni, kleñved, aoziou bevañ, dirfeud, h.a.), sk. : *ar merventi da heul ur gourmesterc'hanel*. 4 (Poblañsouriezh) keñver etre niver an andizhoù ha niver ar boblañs ma tarvezont en ur bloavezh, jedet peurliesañ war un diaz a 100 000 annezad. 5 Ent arbennik, feur mervel diwar ur c'heñved lavaret, sk. : *etre 30 ha 40 % edo feur ar varvusted gant an empennfo morganivus*.

mortalité infantile : taux de ~ ◇ **infancy mortality rate** ◇ **feur mervel mabanel** Keñver etre niver ar vugale marvet e-kerz kentañ bloavezh o buhez ha niver hollel ar vugale bet ganet bev, jedet war un diaz a 1 000 ganedigezh.

mortalité maternelle ◇ **maternal death, maternal mortality** ◇ **mervel mammel** Andizh ur vaouez e-kerz ar vec'hiegi pe dindan 47 devezh goude ar gwilioud.

mortalité néonatale : taux de ~ ◇ **neonatal mortality rate** ◇ **feur mervel nevezc'hanedel** Rannañ a reer ar *feur mervel nevezc'hanedel* etre *a*) ar *f. m. n.* (hep hogozenn), keñver etre niver ar vugale marvet e-kerz an 27 devezh kentañ eus o hoali ha niver ar vugale bet ganet bev; *b*) ar *f. m. n. kentrat* (Gl. *t. m. n. précoce*) o lakaat e penn kont ar 7 devezh kentañ hepken.

mortalité périnatale : taux de ~ ◇ **perinatal mortality rate** ◇ **feur mervel troc'hanedel** Feur jedet dre sammañ ar *feur marvc'hanedel* (sl. *mortinatalité*) hag ar *feur mervel nevezc'hanedel kentrat* (sl. *mortalité néonatale*).

mortinatalité ◇ **stillbirth rate** ◇ **feur marvc'hanedel** Keñver etre niver ar varvc'hanidi ha niver ar vugale bet ganet, jedet war un diaz a 1 000 ganedigezh.

Morton : maladies de ~ : 1 métatarsalgie ou névrome de T. G. Morton 2 maladie ou syndrome de D. J. Morton ◇ **1 Morton metatarsalgia 2 Morton syndrome** ◇ **1 kreiztroadost b. pe nevrom g. T. G. Morton 2 azoniad D. J. Morton** 1 sl. *métatarsalgie*. 2 Anaev laurus a 'n troad da heul berrder askorn kentañ ar c'hreiztroad hag hiperostoz kaennenn an eil.

morula ◇ **morula** ◇ **morula g.** Pazenn e diorreadur ar grouell, ar vi war hanrannañ o kemer neuz ur vouarenn; adal ma krog da furmiñ ur gleuzenn greiz, pe *kavenn hanrannañ* (Gl. *cavité de segmentation*) e reer anv a *vlastula* (sl. *blastula*).

Morvan : maladie ou panaris de ~ ◇ **Morvan disease, analgesic panaris** ◇ **kleñved Morvan, beskoul g. angostek** Anaev naous dre strafuilhoù nerval en izili ha dreist holl er bizied (gouseizi, aneraez, nervost), strafuilhoù teñvel, anezho beskoulou dilaur an oensoù diwezhañ o tedreñ alies d'ar varvennañ ha d'ar muturniañ; an arbennoù a c'houlakaer hiziv eo al lovrezh hag ar c'havnelad.

morve ◇ **glanders** ◇ **morm g.** Pore milzarreuziat o tizhout an unkarneged (azen, marc'h) dreist holl, treuzkasadus a-zarvoud d'an den.

mosaïque ◇ **mosaicism, mosaic** ◇ **mozaik g.** Bezañs gant un hinienn eus div pe lies gread kelligoù kevarall da heul ur variadenn darvezet pe e lankadoù kentañ ar mitoz goude ar frouezhigñ, pe e-kerz ar frouezhigñ dre ziginiezh pe diandriezh (sl. *chimère*); *m. antigenel* (Gl. *m. antigénique*), kenvezañs div c'hread kelligoù gant pep a aveadur antigenel o tont eus gametoù kevarall; *m. kromozomel* (Gl. *m. chromoso-mique*), kenvezañs div pe lies gread kelligoù gant pep a gariotip (da skouer 45 XO 46 XY) — ar ster-mañ diwezhañ a roer d'ar pennañ *mozaik* p'en arverer hep hogozenn (sl. *sexe nucléaire par aberration chromosomique*).

motiline ◇ **motilin** ◇ **motilin g.** Hormon polipeptidek kengediad 22 amindrenkenn, borc'het gant glaourgenn an daouzegegn, a arzoder dezhañ ur roll e loc'herezh ar ganol vezhur.

motilité ◇ **motility** ◇ **1 loc'hadegezh b. 2 fiñval, fiñverezh g., fiñvadegezh b. 3 andeadezh b.1** An dilec'hiadurioù dec'hanet gant argezañ ar c'higennoù, pe loc'hadoù, sk. : *loc'hadegezh ar pervez eo an amdonnegezh*; *loc'hadegezh kevelat* a reer eus argezadur ar c'higennoù amezek da gigennoù seizet. 2 Al loc'hadoù evel lankadoù arc'hwelel, eleze evel fiñvadoù. 3 Gant ar bevion unkelligel pe nemeurgelligel, perzh da zilec'hiañ ent emdarzh pe dre erwezh ouzh ur gentrigenn; a-gevenep d'an andeadezh emañ an *ansezadezh* (Gl. *sessilité*): ar *bevion ansezat* pe *ansezaded* (Gl. *sessiles*) ne zilec'hiont ket, festet ma vezont ouzh ur seulad

NOTENN : Neuennus eo arver an tri zermen *mobilité, motilité, motricité*; er Vezekniezh, gant aozerion 'zo e vez lakaet da genster *motilité* ha *mobilité*, gant re all *motilité* ha *motricité*.

motricité ◇ **motricity** ◇ **loc'hañ, loc'herezh g.** Teskad an arc'hwelioù nerval ha kigennele o kevaraezañ dilec'hiaduroù ha fiñvoù ar c'horf, ken arc'hwelioù ar c'hemoned (Gl. *fonctions de la vie de relation*), ken an arc'hwelioù struzhel (Gl. *fonctions végétatives*).

motoneurone ◇ **motoneuron** ◇ **motoneuron s.** Neuron loc'hañ.

(-)mot-, (-)motr-

• *abolition de la motricité spontanée* steuz ar fiñval emdarzh • *activité motrice* fiñverezh, bevfiñvad • *activité motrice involontaire* fiñverezh andiarvenn pe diarzoug • *affection motrice ou psychomotrice* anaez loc'hadel pe vredloc'hadel • *amitié motrice* anveid ec'hodiñ • *amusie motrice* sonanezluz • *aphasie motrice* ankomez ezluzañ, anezluz • *appliquer le courant sur le point moteur* arloañ an tredan war ar point loc'hadel • *apraxie oculomotrice* andignon lagadloc'hañ • *atteinte motrice périphérique* miloc'h trobarzhel • *bouffée vasomotrice* gwiridrad • *coordi-nation motrice* kenurzhañ loc'hadel • *crise motrice* barrad loc'hadel • *déficit moteur* divigad loc'hadel • *déficit psychomoteur* divigad bredloc'hadel • *diminution de la motilité et de la durée de motilité des spermatozoïdes* istead hag ispad fiñval ar spergelligoù • *épilepsie psychomotrice* droukfell bredloc'hadel • *excitation motrice, agitation* trefiñv • *force électromotrice* gremmder tredanel • *incoordination des mouvements volontaires sans rapport avec un déficit moteur* digenurzh er fiñval diarvenn hep keñver gant un divig loc'hadel • *incoordination motrice* digenurzh loc'hadel • *information motrice* stlenn loc'hadel • *initiative motrice* kentod loc'hañ • *instabilité psychomotrice* ankevrested • *interruption de la motricité* steuz al loc'hañ • *la trop grande mobilité du cæcum* heloc'hded re vras ar sac'henn • *locomotion* emzilec'hañ • *nerf moteur* nervenn loc'hañ • *neurones moteurs* neuron loc'hañ • *noyau gris moteur* gronn louet loc'hañ • *oculomoteur* lagadloc'hadel • *phénomène sensoriel et moteur* anadenn skiantennel ha loc'hadel • *plaque motrice* kevrennervenn-kaher • *plasticité motrice* hezvel kaherel • *retard psychomoteur* dilerc'h pe dilerc'hegezh vredloc'hadel • *se mouvoir, motilité* fiñval • *(se) mouvoir, motricité, mouvement* fiñval, loc'hañ • *sensitivomoteur* santadel-loc'hadel, santout-loc'hañ • *système moteur* trevnad loc'hañ • *trouble de l'orientation automatique du regard portant sur la motilité de poursuite* strafuilh e durc'haat diarzoug ar sell o tizez ar fiñval erlenañ • *troubles moteurs* strafuilhoù pe direzhoù loc'hadel, miloc'h • *trouble psychomoteur* strafuilh bredloc'hadel • *vasomoteur* gwazhiedloc'hadel • *vasomotricité* gwazhiedloc'hañ (sl. **(-)mobil-, mouv-**).

Mott : *cellules muriformes de* ~ ◇ **Mott cells** ◇ **kelligoù mouarek Mott** Plasmokit anrizhek naouus dre ur gaoñell doues teñval, ezkreizat ha dre ur c'hitoplasm leun barr gant vakuolennoù, bezant a-wechoù e mel eskern hag e gwerblennoù gouziviaded an arvevadegezhioù (tripanozomiaz, leichmanioz), ar mielom hag ar vakroglobulinemiezh.

mouches volantes, myodesopsie ◇ **myodesopsia** ◇ **c'hwibed s.** Pikoù skedus o lavigañ er gwelvaez, anezho peurliesañ gweled enlagadel flojennoù ar gwereg (sl. **entoptique, corps flottants**).

Mouchet-Camey : *opération de* ~ ◇ ◇ **oberatadenn Mouchet-Camey** Erlec'hañ ur c'hilbleg daouzegenn ouz ar c'hreuz goude kreuzezvenañ.

Mouchet : *paralysie d'Albert* ~ ◇ **Albert Mouchet syndrome** ◇ **seizi g. Albert Mouchey** Seizi helmoel diwar un helmo ez-kamm amparet ent argammedek pell da heul un torr eus pennig ar paler darvezet er bugelvezh kentañ.

mouillabilité ◇ **wetability, mouillability** ◇ **1 hec'hlebed b., glebiadusted b. 2 glebiadusted** 1 Perzh gant ur gorre da vezañ glebiet. 2 Perzh ar c'hetal sonnenn-liñvenn e dalc'h gremmderioù gorreel an div zanzevenn; spesadel e vez enta da bep daouad sonnenn-liñvenn.

mouillable ◇ **wetable** ◇ **glebiadus aa., hec'hlebed aa.** A-zivout ur gorre en araez da vezañ glebiet; enepster : *angleb* (Gl. *non mouillable*) (sl. **capillarité**).

mouillance ◇ ◇ **glebiusaat** Perzh gant ar gorrewezherioù war zileizh, o gwered muiaat korn kejañ al liñvennoù gant ar sonnenoù.

mouillant ◇ **1 wetting 2 wetting agent** ◇ **1 glebius aa. 2 glebiusaer g. -ioù** 1 A-zivout ul liñvenn a zo he ferzh emledañ war c'horre ar sonnenoù. 2 Gwezher a vesker gant al liñvennoù evit ober dezho bezañ glebiusoc'h.

mouiller ◇ **to wet** ◇ **glebiañ** A-zivout ribl vol ul liñvenn, gorren pe gouzizañ ouz speur ar sonnenn stok outi.

moulin : *bruit de* ~ ◇ **water-wheel murmur** ◇ **trouz g. milin dour** Flokata stenek ha korvezek leteñvel ouz trouz palioù ur vilin dour, a glever e par ar galon pa vez un douraezhad amalonnenn pe un hogennad douraezhel er poullkreiz (sl. **clapote, hydropneumothorax**).

mouvement ◇ **movement** ◇ **1 loc'hañ, loc'h g. -où, loc'had g. -où 2 fiñval, fiñv g. -où, fiñvad g. -où** 1 (Ster fizikel hollek) kemmañ keñverioù egorel e-keñver loadur, durc'hadur. 2 (Ster mezege) loc'hañ diarzoug pe diarvenn a-geñver gant un amkan, eleze en un diarsell na spir ket pennaenn an ergorelezh d'e beurveizañ.

NOTEÑ : Er Fizik ez eo ar Fiñvoniezh hag an Nerzhoniezh skourroù diforc'h mat eus al Loc'honiezh. Er Vezekniezh, pell emañ a vezañ dispartiet ken spis arver an deveradoù diwar *loc'h-* ha *fiñv-* (sl. La-18 227-229).

mouv-

• *amplitude des mouvements au cours d'un mouvement* ampled ar fiñvoù da geñver ur fiñvadenn • *communiquer* pe *imprimer des mouvements* goulankañ fiñvoù • *confor-mer les mouvements volontaires à un but* azasaat ar fiñval diarvenn diouzh ur pal • *coordination des mouvements volontaires* kedrenn al loc'hadoù diarvenn • *décom-position des mouvements* diskemal ar fiñvoù • *exécution des mouvements* fiñvren • *incoordination des mouvements volontaires sans rapport avec un déficit moteur* digenurzh er fiñval diarvenn hep keñver gant un divig loc'hadel • *les quantités de chaleur en mouvement dans un espace clos* ar gwrezadoù en arloc'h en un ec'honenn gloz • *mouvement, agitation (molécules)* lavig • *mouvement, déplacement* loc'h, loc'had • *mouvement associé* kenfiñv • *mouvement brownien* gwrezlavig • *mouvement cinétique* korz • *mouvement conjugué des yeux* fiñval kevreet an daoulagad • *mouvement d'élevation, d'abaissement de l'œil* fiñv gorren, gouzizañ al lagad • *mouvements de déglutition* fiñvoù lonkañ • *mouvement des valvules* loc'h an trapigoù • *mouvement désordonné des particules* morloc'h dizurz gant an eufil • *mouvement fébrile* bomm gwrester • *mouvement intentionnel* fiñval diarvenn • *mouvement pendulaire d'un membre* fiñv momeder gant

un ezel • *mouvements automatiques, volontaires* fiñval diarzoug, diarvenn • *mouvements amiboïdes* loc'hou amoebvanek • *mouvements automatiques* fiñvoù diarzoug • *mouvements de la population* kendro ar strollennoù tud • *mouvements des anses intestinales* loc'hadoù ar c'hilblegou pervez • *mouvements idéomoteurs* fiñvadoù argelañ pe argeladel • *mouvoir un appareil de prothèse* kefloc'hañ un erstedell • (*se*) *mouvoir, mouvement, motricité, motilité* fiñval, loc'hañ • *muscle effectuant l'action principale d'un mouvement* kigenn o ren gwered pennañ ur fiñvadenn • *suite de mouvements nécessaires à la réalisation d'un exercice précis* heuliad ar bevfiñvoù ret da gas da benn un embregad lavaret (sl. *(-)mobil-, (-)mot-, (-)motr-*).

Mowlem-Jackson : greffe ou technique de ~ ◇ **Mowlem-Jackson graft** or procedure ◇ imboud g. pe araezad g. **Mowlem Jackson** Kalvezder imboudañ embreget war an devidi a-vras, anezhañ pebeilañ bandennoù 1,5 cm led kroc'hen unanien hag unspesadien; teir sizhun goude an oberatadenn emañ ezvennet an imboudoù unspesadien e gounid un epitelienn evodet eus an imboud unanien.

moxa ◇ **moxa** ◇ **moksa** g. -où Bazhig pe boullig danvez helosk a lakaer da zeviñ war boentoù 'zo eus ar c'horf, mod tanezañ a orin japanat; termen japanek o verkañ an dum eostet diwar delioù an huelenn *Artemisia moxa* ha torpezet da aozañ ar moksaou.

moxation, moxibustion ◇ **moxibustion** ◇ **moksaëzañ** Araezad kurañ henarveret er Reter-Pellañ, a embreger dre vutleskiñ *moksaou* (sl. *moxa*) war boentoù 'zo eus ar c'hroc'hen.

Moynahan : syndromes de ~ ◇ **Moynahan syndromes** ◇ **azoniadoù Moynahan** 1 Kevreted dibaot kenan diwaoutad, droukfell ha dilerc'h bred. 2 Kevreted dibaot kenan lentiginoz kemparzhiek ha bugelvanegzh.

mucilage ◇ **mucilage** ◇ **luvouezh** g. -ioù Danvezenn geurvolekulek (polisakaridoù ha glikoproteinoù) bezant e kalz struzhennoù, o vont dre c'houzourañ d'ul liñvenn c'hludek; astenn a reer erdal an termen d'an dileizhennoù kolloidel ha da angevezhioù gludek a orin all; al luvouezhioù a zanvezer da harpad evit aozañ liaoù e rezh arlungeoù; o diounit a reer ivez evel laoskuzennoù (sl. *laxatif mécanique*).

mucinase ◇ **mucinase** ◇ **mukinaz** g. Enzim bezant e glaourgen ar pervez o tec'han kaouledadur ar glaour.

mucine ◇ **mucin** ◇ **mukin** g. Danvezenn dreuzwelus, gludek, o kaouediñ dre an drenken aketek ha n'eo ket dre ar wrez; danzeet e vez gant kelligoù ar glaourgen ha hogennañ a ra e-barzh o entremeziou.

mucinoze ◇ **mucinosi** ◇ **mukinoz** g. Kleñved naouus dre an ensiladur mukin er gwiadoù (sl. *mucinoze folliculaire, myxœdème, sclérocédème*).

mucinoze folliculaire, alopecie mucineuse de Pinkus ◇ **follicular mucinosi** ◇ **mukinoz bolc'hennel, diwaoutad g. mukinus Pinkus** Kleñved a 'r vole'henn vlevel o kevrediñ an danijenn hag an ensiladur anezhi gant ar mukin; stadet war an oadour yaouank dreist holl e rezh tachadoù hevonn diwaoutad er brigenn hag en divabrant, kevret e par ar fas hag ar gouzoug gant plakennoù arruz pe krugenoù bolc'hennel.

mucite ◇ **mucitis** ◇ **glaourgeninfo** g. Tanijenn ur glaourgen a orin kuradel alies (kimi- pe skingurañ).

Muckle et Wells : syndrome de ~ ◇ **Muckle-Wells syndrome** ◇ **azoniad Muckle-Wells** Anaer familhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek o kevrediñ, er furmoù klok, resmiadoù arzostoù ha linadell o teraouiñ er c'hrennoad, ur bouzarder dec'havael hag un amiloz a 'l lounezh (a rizh AA); letenvelerioù ez eus etre an azoniad-mañ hag ar c'hleñved mareadek (sl. *périodique* : *maladie ~, urticaire familiale au froid*).

muco-cutané-oculaire : syndrome ~ ◇ **muco-cutaneous-ocular syndrome** ◇ **azoniad glaour-kroc'hen-lagad** Termen arveret da arouezh ar stroll amparet gant azoniad Behçet, azoniad Fiessinger-Leroy-Reiter hag an ektodermoz graspadek liesigorennel (sl. *Behçet* : *maladie de ~, ectodermose érosive pluri-orificielle*).

mucocèle ◇ **mucocèle** ◇ **glaourvozhell** b. Hogennad glaour kistvanek; g. *an divilhenn* (Gl. *m. appendiculaire*), hogennad glaour o c'henniñ oaled an divilhenn breñvek; g. *sac'h an daeroù* (Gl. *mucocèle lacrymale*), usvoll sac'h an daeroù, gannet gant un danvezenn arvelen ha gludek, da heul steviadur ar san a-fri.

mucographie ◇ **mucography** ◇ **glaourgenluniñ** Imbourc'hiñ dre ar skinoù X ec'honneuz glaourgen ar ganol vezhur intret gant un Xdemerenn.

mucoid ◇ **mucoid** ◇ **1 mukinvanek** aa. **2 glaourgenvanek** aa. 1 Letenvel ouzh ar mukin (sl. *mucine*). 2 A-zivout ur c'hist amparet ar speur anezhañ gant un epitelienn granennek heñvel ouzh hini ar glaourgennoù.

mucolipidose ◇ **mucolipidosis** ◇ **mukolipidoz** g. Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, e dianlen ur strafuill kennevidel dre ziouer enzim, naouus dre ar yoc'hadur en organoù 'zo eus mukopolisakaridoù trenkek hag eus glikolipidoù; lies seurtad *m.* a zeskriver, heñvel ent klinikel ouzh kleñved Hurler, diforc'h dioutañ avat dre ezvezañs ar mukopolisakaridoù en troazh (sl. *ganglioside, Hurler* : *maladie pe syn-drome de H., mucopolysaccharidose*).

mucolyse ◇ **mucolysis** ◇ **glaourloezañ, glaourloez** g. Liñvennañ ar glaour.

mucométrie ◇ **uterine mucocèle** ◇ **krozhc'hlaourad** g. Hogennadur ar glaour e-barzh kavenn ar grozh da heul anvoll ar gouzoug.

mucopolysaccharide, glucosaminoglycane ◇ **mucopolysaccharide** ◇ **mukopolisakarid g., glukozaminoglikan g.** Seurtad glikoproteinoù, reoù *nitrogenek* (mukoidoù ha kondroidoù); re all, *trenkek* (proteoglikanoù), zo kedrannoù pennañ bondanvezenn ar gwiaid kenglenel (da skouer, ar c'hondroitin-sulfatoù, an heparin-sulfat, deveradoù an drenkenn hialuronek); en o zouez emañ ivez antigenoù ar rizhoù gwad, kedrannoù eus uzenn ar pneumokok.

mucopolysaccharidose ◇ **mucopolysaccharidosis** ◇ **mukopolisakaridoz** g. Kleñved hêrezhel naoues dre vigennevid enzim-atek ar mukopolisakaridoù trenkek; ar re-mañ, reñverek, a vez yoc'het er gwiadoù hag ezvevnet dre an troazh; erzerc'hadoù klinikel boasañ an anaez eo ar migornviweoù a stader en un niver a gleñvedoù, bet renket hervez 7 rizh (rummadur McKusick, 1966).

mucopolysaccharidurie ◇ **mucopolysacchariduria** ◇ **troazhusvec'h mukopolisakaridoù** Reñver mukopolisakaridoù en troazh; dindan 10 mg/l gant ar bugel ha 5 mg/l gant an oadour emañ ar feurioù reol anezho.

mucoprotéine ◇ **mucoprotein** ◇ **mukoprotein** g. Seurtad glikoproteinou; reoù 'zo, ouzhpenn 4 % glukid enno, a reer *m. gwir* anezho; reoù all dindan 4 %, a vez anvet gant aozerion 'zo *gliko-* (pe *gluko-*) *proteinou*; bezant emañ ar *m.* er migorn (kondroidoù), er mukin (mukoidoù) hag e proteinou ar plasma (sl. *glucidogramme, glycoprotéine*).

mucopus ◇ **mucopus** ◇ **glaourlin** g. Glaour dezhañ neuz al lin gant ar paot ez eo ennañ al leukokit.

mucormycose ◇ **mucormycosis** ◇ **mukormikoz** g. Alouberezh ar bevedeg gant foue eus ar c'herentiad *Phycomycetes* : *Mucor, Absidia, Rhizopus*, o tarvezout gant an diabeiton en akidoketoz ha gant an hangaeastaleion; adal kavenn ar fri, o lec'h boas da enteñ, e treled ar foue d'ar c'hevioù, d'ar poull lagad, d'an empenn hag alies d'ar flugez all (skevent); en dedro boasañ emañ an trombozioù aloubus, ar c'homa hag ar marv dindan un nebeut devezhoù.

mucosité ◇ **mucosity** ◇ **kraost** g. Danvez gludek o c'holeñ glourgennoù 'zo, anezhañ glaour fetis oc'h engronnañ kelligoù gourc'hennet, garvevion hag uloc'h.

mucoviscidose, mucoviscose ◇ **mucoviscidosis cystic fibrosis** ◇ **mukoviskidoz** g. Anaez hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek; ar c'henenn giriek, loet war ar c'hromozom 7 hag erzerc'haet gant epiteliennoù 'zo, a voneg ur protein lavaret *CFTR* (*cystic fibrosis transmembrane conductance regulator*) o reoliñ treizh ar c'hlor a-dreuz koc'henn ar c'helligoù; darallet e vez arc'hwel an iongan klor gant un dargenad eus genenn ar *m.* (anataet ez eus bet ouzhpenn 1000 dargenad eus an kez genenn); a-zianlen e teu gant ar glaourgennoù borc'hadennoù puilh, gludek kenan, enno un usvec'h glikoprotein, ha gant al levrgennoù liñvennoù klor- ha natriomusvec'hiek; an hini paotañ eo eus kleñvedoù hilel ar vugale (1 degouezh dre 2 000 ganedigezh); liesstumm eo ha tizhout a ra dreist holl an ilgreiz ezvorc'hat (*fibroz kistek* pe *kleñved fibrokistel an ilgreiz*) ha gwagrennoù epitelienn ar bronkez; ent klinikel ez erzerc'h gant an nevezc'hened dre un antreizh pervez marvus (stoc'had mekoniel, sl. *iléus*), pe dre strafuilhoù koazhadel da heul skorted an ilgreiz : darc'hoal henek puilh ha druzoulek gant gloen, fibroz an avu ha dilerc'h ar c'hreskiñ, pe alies dre ur poreadur skevent lemm pe henek seul c'hrevusoc'h ma 'z eo yaouankoc'h ar bugel; e-kichen ar furmoù a zedro marvus herrek e revez furmoù o tedreiñ war hir amzer; abaoe 2002 e Frañs e rener ent reizhiadek diournadur ar mukoviskidoz war an nevezc'hanidi (dezventerezh an tripsin hangaezazgweredel er gwad).

mucus ◇ **mucus** ◇ **glaour** g. Danvezenn borc'het gant gwagrennoù glaourbar (sl. *cellules caliciformes, muqueuse*).

mue ◇ **voice break** ◇ **muzad** g. Diskenn 1 pe 2 eizhvedell uc'hder ar vouezh da heul kresk ec'honad ha gouzizadur ar c'harloc'henn dre wered an androgeiner o tarvezout da geñver kaezoureezh ar baotred.

muguet, blanchet ◇ **thrush, white mouth** ◇ **borb** g. Seurtad kandidiaz a 'r genoù o sezañ war an teod, an divvoc'h, ar stavn hag an divweuz, oc'h erzerc'hañ dre blakennoù gwenn diennek o taskantañ ha dre drenkegezh an halv; tizhout a ra dreist holl ar vabaned hag an oadourion isvaget ha falezhek.

Muir-Torre : syndrome de ~ ◇ **Muir-Torre syndrome** ◇ **azoniad Muir-Torre** Kevreted yoc'hennoù kuñv pe yud ha karkinomoù liesel er pervez, er c'hreiz pe er c'harloc'henn; treuzkaset e vez er mod aotozomek trec'hek.

Müller : canal de ~, TA ductus paramesonephricus ◇ **Müllerian duct** ◇ **kanol b. Müller, san b. lez-krennlounezh** Furmadur pibellek daoudañvat rizhellel, o skoanañ gant ar gourev ha, gant ar venev, oc'h emdreñ d'ober ar gouin, ar grozh, ar c'horzennoù hag ul lodenn vras eus ar gouin.

Müller : signe de (Friedrich von) ◇ **Müller sign** ◇ **arouez b. (Friedrich von) Müller** Lammoù er ouel stavn hag en huegoù o tisoc'h eus kevreted pouz ar c'horrwazhied hag an talmoù karotidel, arouez skorted an aortenn.

multifactoriel ◇ **multifactorial** ◇ **liesparennel** aa. O taveiñ da lies parenn : da lies parzhiad, da lies ampar, e dalc'h lies arbenn (sl. *facteur*).

multigeste ◇ **multigesta** ◇ **liesbec'h** aa. A-zivout ur vaouez vec'hiek nad eo dougerez evit ar wech kentañ (sl. *nulli-geste, primigeste*).

multinévrite, névrite multiple, mononeuropathie multiple ◇ **disseminated neuritis** ◇ **nervennfo** g. **strewek** pe **liesel** pe **liessez, elnervennfo** g. Tizhad diasar pe diaheul lies nervenn drobarzh loet alies e lec'hioù kempell hag ankemparzh, naoues dre laurioù, seizi hag isteñv ar c'higennoù keñverek.

multiparte ◇ **multipartous** ◇ **liesganerez** aa. A-zivout ur vaouez bet mamm da ouzhpenn ur bugel.

multiplet ◇ **multiplot** ◇ **liesac'h** b. Steudad barroù gwered kenheuilh gant entremezioù berr.

multi-

● *adénomatoze de sièges multiples* adenomatoz liessez ● *adénome multinodulaire* adenom liesnozelek ● *affection multikystique* anaez lieskistel ● *arrêt de la multiplication des bactéries* skoilhañ ouzh neridigezh ar bakteri ● *cavités gazeuses uniques ou multiples* kavennoù aezhel unel pe liesel ● *cellule multipotente, pluripotente* kellig liesac'hus ● *comprimés à couches multiples* moustradoù liesgwiskad ● *division (multiplication) cellulaire* emrannañ, emrannerezh, emrannidigezh, emrannadeg ar c'helligoù

• *cycle de multiplication* nergor • *érythème multiforme* eritem liesneuz • *goitre multinodulaire* pennsac'h liesnozelek • *kyste uniloculaire, multiloculaire* kist unlog, lieslog • *lésion cutanée multiple* anaf kroc'hen liesel • *leucoencéphalite multifocale* gwennempennaoued liesannon • *multicanal* liessanell • *multifocal, multiloculaire* liesannon, liesannonek • *multilésionnel* liesanafus • *multiloculaire* lieslec'h, lieslog • *multinucléé* lieskroañellek • *multiplication des cellules* kelligoù o neriiñ • *multiplicité d'anévrismes miliaires* lieselezh darvoudoù milier • *multiplicité des comportements* liested ar realoù • *multiviscéral* liesflugezel • *noyau multilobé, hypersegmenté* kraoñell lieshoskek • *multispécialité* liesarbennigiezh • *myélome multiple* mielom liesel • *se multiplier, multiplication, prolifération* paotañ, paotidigezh • *tumeur unique ou multiple* yoc'henn un-pe liessez.

Münchhausen : syndrome de ~ ◇ **Münchhausen syndrome** ◇ **azoniad Münchhausen** (A-zave d'ar baron von Münchhausen, 1720-1797, ofiser alaman aet d'un dudenn a vojenn en askont d'e droioù marzhus) Bredanaez a stader gant gouziviaded henterion ar gwazrannoù surjianerezh evel ma test o c'horf kleizennek, hag int darnezierion gleñvedoù hag imbroudellerion darvoudoù biskoazh dramaekoc'h ha diwirheñveloc'h; un derc'hanaez surjaniel eo (sl. *Lasthénie de Ferjol : syndrome de ~, pathomimie*).

Munro : point de ~ ◇ **Munro point** ◇ **poent Munro** Poent loet er c'henskejad etre ribl diavaez ar gigenn eeun hag al linenn treset eus ar spermenn glun araok uhelañ dehou d'ar begel (poent divilhennel) (sl. *McBurney : point de* ~).

muqueuse, TA tunica mucosa ◇ **mucous membrane** ◇ **glaourgenn g.** Gwiad o c'hoarvezout eus un epitelienn granennek pe liac'hek o pallennañ speur diabarzh ar c'havennoù naturel hag an darn vuiañ eus an organoù kleuz.

muqueuse pituitaire, TA membrana mucosa nasi [regio olfactoria] ◇ **mucous membrane of nose, schneiderian membrane** ◇ **glaourgenn ar fri, rannbarzh ar c'hwesda** Glaourgenn o pallennañ speur kavenn ar fri.

muqueuse tympanique, TA tunica mucosa cavi tympani ◇ **tunica mucosa cavi tympani** ◇ **glaourgenn kavenn an daboulin** Glaourgenn o pallennañ kavenn an daboulin.

muque-, muc-, myx-

• *bronchomucocèle* glaourvozhell vronkez • *capuchon muqueux* pak ar gurunnenn • *cellule mucipare* kellig glaourbar • *contact muqueux* keraez glaourgennel • *écou-lément aqueux ou muqueux* diver dourek pe glaourek • *entérocolite mucosum-braneuse* hollbervezfo pe enterokolit glaourliennek • *hypersécrétion muqueuse, hypermyxie* glaoursvorc'h • *lésions cutanéomuqueuses* anafoù kroc'hen ha glaourgenn • *liquide tantôt séreux, tantôt fibrineux ou muqueux* liñvenn gwech levrus, gwech fibrinek pe glaourek • *membrane muqueuse* lienenn glaourgennek • *mucorrhée, myxorrhée* glaourver • *myxœdème* miksedem • *myxome* miksom • *râles humides, muqueux* ronkoù mouest, glaourek • *selles muqueuses* oulennoù glaourek • *sous-muqueuse* endan-c'hlaourgenn • *syndrome adénocutanéomuqueux* azoniad gwerblenn-kroc'hen-glaourgenn • *téguments cutanés et muqueux* amwiskadoù kroc'heneñ ha glaourgennel • *vaisseaux lymphatiques sous-muqueux* gwazhied limf endan-c'hlaourgenn.

murin ◇ **murine** ◇ **logodel aa., murin aa.** O tont eus ar razhed pe al logod, a-zave d'al loened-se (sl. *typhus murin*).

murmure respiratoire ou vésiculaire ◇ **respiratory murmur** ◇ **sourr g. an anal** Trouz o sevel eus al logigoù skevent da geñver an enc'hwezhañ hag an enc'hwezhañ anezho, a glevr pa selaouenner bruched un den salv a nep anaez analadel hag o tennañ reol e anal.

murmure rotatoire ou musculaire ◇ **muscle murmur** ◇ **sourr ar c'higennoù** Trouz goloet argrezadur ar c'higennoù.

Murphy : signe de ~ ◇ **Murphy sign** ◇ **arouez b. Murphy** Laur delanket gant teutadur don rannbarzh ar gellig vestl, ar gouziviad o vezañ gourvezet a-gein hag oc'h enanalañ a-helc'h; an arouez eo eus ur c'hrouanegezh vestlel.

muscarinien ou muscarinique : effet ~ ◇ **muscarinic action** ◇ **gwered g. muskarinel** Gwered lianiñvel leteñvel ouzh hini ar muskarin (alkaloid bezant e foue pistrius'zo), anezhañ gorrekaat tead ar galon, frankaat an talmerennigoù, izelaat ar gwask talmerel, ober argrezañ ar pervez hag ar bronkez, muiaat ar borc'herezhioù; an disoc'h eo eus fraouarezh ar buzerioù muskarinel, heñvel ouzh gwered ar fraouaat goudekangrennel parasimpatek (sl. *choli-nergie, muscarinien : syndrome* ~, *récepteur muscarinique*).

muscarinien : syndrome ~ ◇ **muscarinic syndrome** ◇ **azoniad muskarinel** Teskad ar strafuilhoù o tarvezout diouzhtu goude euvriñ foue a zo enno muskarin (*Amanita muscaria, inokib, kitokib*) : c'hwezadur puilh, halvsvorc'h, daeraouiñ, bronkezstrishaat, mabisvoll, kalonistead, iswask talmerel, furm eus *azoniad an dispizusvroud* (Gl. *syndrome d'hypertonie vagale*) a brederier dre an atropin.

muscle, TA musculus ◇ **muscle** ◇ **1 kaher g. 2 kigen b. -où** 1 Gwiad ar c'higennoù, o c'hoarvezout eus kelligoù hirvoan (*kaherwiannoù* pe *miokit*, sl. *fibre musculaire*), gronnet en ur goc'henn (sl. *sarcoleme*), *kaherwianoù* (sl. *myofibrilles*) en o c'hitoplasm, hemañ graet ivez *sarkoplasm* (sl. *sarcoplasme*) anezhañ; perzh pennañ ar c'haer eo e argrezusted (sl. *contractilité*). 2 Organ amparet gant gwad kaherel, a ziforc'her daou rumm anezhañ : a) ar c'higennoù levn (Gl. *muscles lisses*), kigennoù ar struzhelezh, amparet gant *kaherwiannoù levn*, bezant er flugez hag e speur ar c'hanolioù; b) ar c'higennoù rizennek (Gl. *muscles striés*), *gwiannoù rizennek* ouzh o ober, anezho ar c'higennoù atelel (Gl. *muscles squelettiques*), kigennoù ar c'hemoned, hag ar c'haer kalon (Gl. *myo-cardé*) (sl. ivez an termenou o teraoùñ dre *léio-, mya-, myo-, rhabdo-*).

muscularis mucosæ, TA lamina muscularis mucosae ◇ **lamina muscularis mucosae** ◇ **kaherlavenn b. glaourgenn** Gwiskad kaher levn tanav loet dindan glaourgenn ar ganol vezhur.

musculature ◇ **musculature** ◇ **1 kigenadur g. 2 kahereg b.** 1 Teskad ha staladur ar c'higennoù a ya d'ober ar c'horf pe ur parzh korf. 2 Teskad gwiadoù kaherel, sk. : *kahereg levn ar pervez*.

musculeuse, tunique musculieuse ◇ **muscularis, tunica muscularis, muscular coat** ◇ **kahersae b.** Gwiskad kaherwiennoù levn oc'h araezañ loc'hadegezh un organ (kanol ar mezhur, benvegadoù analañ, troazhañ, h.a.).

Musset : signe de ~ ◇ **Musset sign** ◇ **arouez Musset** Hejadurioù ar penn a-gorvez gant lamm ar galon, stadet war gouzviaded ar skorted aortek (arouez notet evit ar wech kentañ gant Alfred de Musset warnañ e unan).

mussitation ◇ **mussitation** ◇ **muzellata** Fiñval an divweuz hep deluzañ ger nag ec'hodiñ son ebet, strafuilh a stader e kleñvedoù grevus gant tizhad an empenn.

Mustard : opérations de ~ ◇ **Mustard operations** ◇ **oberatadennoù Mustard** 1 Erougurañ surjaniel kammload ar gwazhied bras, anezhañ dewerc'hañ ur c'hammload a'r gwazhiennoù dre dilhennañ ar c'henteziou ha gant se dereizhañ kammload an talmerennoù. 2 Erougurañ e daou dennad un distro gwazhiennel ezreol hollel; en tennad kentañ e tasforzher ar wazhienn gav uhelañ ouzh ar c'hentez dehou; en eil lankad, ez argoulmer ar wazhienn gav uhelañ a-us difourk an holl wazhiennoù skevent hag e klozer ar c'hehentad etre-kentezoù.

mutagène ◇ **mutagen** ◇ **dargeneiat aa.** A-zivout nep gwezher (fizikel pe gimiek) en araez da zevoudañ un dargenad.

mutagenèse ◇ **mutagenesis** ◇ **dargenbarañ** Dinodiñ un dargenañ, emdarzh pe galvezadel.

mutagénicité ◇ **mutagenicity** ◇ **dargeneiadezh b.** Araezusted da zelankañ un dargenad.

mutant ◇ **mutant** ◇ **1 dargenat aa. 2 dargened g. -idi** 1 A-zivout ur c'henenn, un doareenn e kement ma 'z int sez an dargenañ. 2 Hinienn o tisc'h eus un dargenañ.

mutase ◇ **mutase** ◇ **mutaz g.** Enzim oc'h araezañ treuzdoug un pe lies atomenn e diabarzh ur volekulenn.

mutation ◇ **mutation** ◇ **dargenañ, dargenad g.** Trozad trumm, klok a-gentizh, en doareennoù hêrezhel, en ervez da zont hêrezhel d'e dro ha da erodiñ ur spesad nevez; an dianlenad eo d'un daskemm darvezet en ur parzh bras pe vrasoc'h eus molekul DNA ar c'hromozom da geñver emrannañ ar c'helligoù.

mutacionisme ◇ **theory of mutation** ◇ **damkaniezh b. an dargenañ, dargenadouriezh b.** Doazhadur oc'h intent an emdroadur evel un heuliad dargenadoù, o harpañ war an ankendalc'hegezh a stader e daskended doareennoù ar rummadoù bevion; enebet emañ an dargenadouriezh ouzh damkaniezh Darwin a'n emdreñ kendalc'hek.

mutisme ◇ **mutism** ◇ **simud g.** Steuz al lavar teodel, termen hollek oc'h erdalañ lies degouezh : *a*) ar simud diarvenn evel emzalc'h reol er gedvuhez, *b*) ar simud fromel, *c*) simud ar fincherion, *d*) ar simud azon bredanaez, stadet en darfell, er gouvid, en arluz, en dilerc'hegezh don, en envedi; ent klasel ez ezlakaer an ankomoù, ankomez Broca pergen (sl. **aphasie, mutité, pathomimie, simulation**).

mutisme akinétique ◇ **akinetic mutism** ◇ **simud anfiñvel** Azoniad naous dre un anniñv hollel, steuz klok ar gomz hag ar fiñval emdarzh pe treodet (lakaet er-maez fiñval an daoulagad); an arbenn eo un anaf en div dolbezenn dal pe un empennfoeñv lemm dre yoc'henn an trede kambr (sl. **verrouillage : syndrome de ~**).

mutité ◇ **dumbness** ◇ **muderezh g., anezluz g.** Dic'halloud da gomz dre benn amziorren pe anaf ar c'hreizennoù nerval hag organoù al lavar teodel, kevret pe get gant kleverezh reol ar c'homzoù; diforc'hiñ a reer : 1) *muderezhioù ar vugale*, daou zegouezh dezho : *a*) *klevmuderezh ganedigel* (sl. **audimutité**), anezhañ daou seurtad : α) ar *c'hlevmuderezh enluzañ*, ar muderezh o vezañ e dalc'h un andenaoud klevout (sl. **agnosie auditive, audimutité de compréhension**); β) ar *c'hlevmuderezh ezluzañ*, ar muderezh o vezañ dec'hanet gant mizigonou (izilded loc'hadel) (sl. **audimutité d'expression, 1 débilite, dyspraxie**); *b*) *bouzarmuderezh ar vugale* (sl. **surdimutité**), hêrezhel pe dianlenad d'un daraez gwilioudel pe ur pore er mabanvezh (skouarnfo, pilhonfo, empennfo); 2) *muderezhioù an oadourion*, anezho an ankevaot, an ankomoù ha, gant ar gozhiaded, ar seziou hirvelel ha gaouhirvelel (sl. **anarthie, aphasie, para-lysie bulbaire, paralysie pseudobulbaire**, La-17 232-236).

muton ◇ **muton** ◇ **muton g.** An tamm bihanañ a zafar hilel a zo an daskemm anezhañ en araez da zec'han un dargenad.

myalgie ◇ **myalgia** ◇ **kaherost b.** Laur er c'higennoù.

myalgie épidémique, maladie de Bornholm ◇ **epidemic myalgia, Bornholm disease** ◇ **kaherost darreuziat, kleñved Bornholm** Kleñved kiriek dezhañ virus *Coxsackie B*, o reuziañ e Norzamerika hag e broezioù Norzeuropa, bet deskriet evit ar wech kentañ en enezenn danat Bornholm; goude un deroù trumm dre laurioù kriz e diaz ar brusk o skoilhañ an analañ, ez anaod taollenn glinikel ur pore : terzhienn, klopennad, ervezh pilhonel, rouestlet alies gant erzerc'hadou krezennekeventel, amgalonennfo, skouarnfo krenn, empennfo zoken; dedreñ a ra etrezek ar pare, a-wechoù goude un pe zao adfeilh (sl. **Bornholm : maladie de ~**).

myasthénie ◇ **myasthenia gravis** ◇ **miasteniezh b.** Kleñved unanhangaeel naous dre un diviañ buan eus nerzh ar c'higennoù edoug an embreger hag un azgrenaat ken buan all er paouez; tizhet e vez dreist holl kigennoù loc'hañ al lagad, ar chagellerioù, kigennoù ar c'hargadenn hag ar c'harloc'henn, a-wechoù kigennoù ar gouzoug hag an izili; a-geñver emañ gant tolc'had goude-sinapsel ar juntad nervenn-kaher, direet dre an enepkolesterazeier (prostigmin).

myatonie, amyotonie ◇ **myatonia** ◇ **antant g.** Steuz an tant (sl. **atonie**).

NOTENN : Kevatal eo Br. *tant* da Gl. *tonus musculaire*, stambouc'h ne ve ken enta ober gant ur Br. * *kaherantant*.

myatonie congénitale, amyotonie congénitale, maladie d'Oppenheim ◇ **amyotonia congenita, Oppenheim disease** ◇ **miationiezh b., kleñved Oppenheim** Kleñved a'r bugelvezh kentañ, naous dre ur seizi gwak klok pe amglok, antant, hep

anteñ, o tizhout kigennoù an izili, a-wechoù re ar c'hef, hebiat bepred d'ar fas; a-geñver e ve gant aneroubar kelligoù kerniel arak ar mel; hiziv e reer anezhañ ur furm eus *kleñved Werdnig-Hoffmann*.

mycétide ◇ ◇ **miketid** g. Erzerc'had allergek er c'hroc'hen, er benvegadoù analañ pe koazhañ, diwar stekiñ, dewentañ pe euvriñ spor foue.

mycétisme ◇ ◇ **fouegezh** b. Pistriadur dre ur foue uhelañ (kebell touseg).

mycétome ◇ **mycetoma** ◇ **miketom** g. Gaouyoc'henn foel liesfic'hek dezhi ur gentsez endan-groc'hen, naous dre ur feltradur eadavennoù war ezvevennañ e rezh greun a vent, a liv hag a gantalc'h kevarall hervez spesad ar gwezher kleñvedus, hemañ o vezañ ur foue (*m. fongique*) (sl. *maduromycose*) pe ur bakteri (sl. *actinomycose*).

mycobactériose ◇ **mycobacteriosis** ◇ **mikobakterioz** g. Rumm kleñvedoù devoudet gant ar mikobakteri (genad ar *Mycobacterium*) ha dreist holl gant ar mikobakteri “anrizhek”, eleze estreget bazhilli an dorzhellegezh hag al lovezh, anezho tizhadoù ar benvegad analañ, heñvel ouzh an dorzhellegezh, hag ar c'hroc'hen (*granulom al lennoù neuñ, angreizh Buruli*), ivez furmoù hollek gant terzhenn hag erzerc'hadou er gwad, er c'hroc'hen, en avu hag er felc'h (sl. *granulome des piscines*).

Mycobacterium ◇ **Mycobacterium** ◇ **Mycobacterium** Genad bakteri eus kerentiad ar *Mycobacteriaceae*, urzhad an *Actinomycetales*, anezho bazhilli trenkennharz, reoù o vezañ mikobakteri kleñvedus evit an den (*M. tuberculosis, M. bovis, M. leprae*), reoù all kelanet, ha reoù c'hoazh, lavaret “anrizhek”, evel *Mycobacterium avium*.

mycodermothérapie ◇ **mycodermotherapy** ◇ **govegurañ** Arver yac'hadel eus ar govevion, govev ar bier pergen.

Mycoplasma ◇ **Mycoplasma**, **pleuropneumonia-like organism, PPLO** ◇ **Mycoplasma** Genad korrevion siladus (mikoplasmou), oc'h anadiñ dre ar c'horrgrsker elektronek evel greunigoù 100 da 200 nm, heñvel ouzh ar viruzoù hag o neriñ, evelto, er metoù kelligel; kevarall dezho avat dre ma vezont amparet gant trenkennoù ribonukleek (RNA) hag e tiñvont en anvervad ha war geloz; Gram+ int; kiriek int da gleñvedoù ar plant hag al loened; gwezher ar c'hrezenskeventfo eo ar *M. mycoides*.

mycose ◇ **mycosis** ◇ **mikoz** g. Anv genadel an anaeziou arvevadel devoudet gant ar foue.

mycosis fongóide, maladie d'Alibert ◇ **mycosis fongoides** ◇ **mikoziz** g. **fongóidel** Dermatoz henek, o tedreñ direoliek, marvus bepred, naous en e furm glasel (*rizh Alibert-Bazin*) dre un debtron feuls, dispuilhadoù diseurt, eritematus pe ekzemavanek, neuze dre blakennoù likenvanek, ensilet, koagennek, gant debtron, c'hwarrennoù, daralladur a 'r stad hollek hag, en dibenn, yoc'hennou ruz-kel en ervez da angreizhañ; dianav eo arbenn ar *m.* hag en arguz e van e natur : renket eo bet e-touez an hematodermaoù (ul limfosarkom gant limfokit T e ve) ha nesaet ouzh al leukemiezhoù, ar retikuloendoteliozoù ha, dreist holl, da azoniad Sezary (sl. *lymphosarcome, Sézary : syndrome de ~*).

mycothérapie ◇ **mycotherapy** ◇ **fouegurañ** Arver yac'hadel ar foue; aozerion 'zo a intent ar foue uhelañ nemetken, re all ar foue korrgrskel, oc'h ambredañ war un dro ar govevion hag an danvezennou borc'het gant ar foue (penikillin, streptomikine, h.a.).

mycotoxicose ◇ **mycotoxicosis** ◇ **mikotoksikoz** g. Pistriadur dre euvriñ louedennoù o tiñvañ war ar bouedoù (druilh ar segal, *Aspergillus, Penicillium*, h.a.) hag o vorc'hañ danvezennou pistriek, ar *mikotoksinoù* (Gl. *mycotoxines*) (sl. *ergot de seigle, ergotisme*).

mydriase ◇ **mydriasis** ◇ **mabusvoll** g. Frankaat ar mab lagad, bonan, kleñvedel pe lianiñvel (sl. *réflexe photomoteur, réflexe à la vision de près*).

mydriatique ◇ **mydriatic** ◇ **1 mabusvullus** aa. **2 mabusvuller** g. -ioù 1 O frankaat ar mab lagad. 2 Danvezenn vabusvullus (sl. *atropine*).

myélemie ◇ **myelaemia** ◇ **gwadvelegezh** b. Tremen er gwad eus kelligoù anazv a 'r mel eskern (hemati kraoñnellek, mielokit), anadenn ardreuzat e-kerz adc'henezhadurioù ar mel, henek er gwadnaouedoù mieloidel.

myélcéphale, TA myelencephalon ◇ **myelencephalon** ◇ **melempenn** g. Lodenn eus ar mel penn, anezhi an hirvel (sl. *bulbe rachidien*).

myéline ◇ **myelin** ◇ **mielin** g. Feur lipidoprotidek o kaenañ aksonoù an nerved kreiz ha trobarzh (sl. *axone, démyélinisation, fibre nerveuse, gaine*).

myélinolyse ◇ **myelinolysis** ◇ **mielinloezañ, mielinloez** g. Distrujañ ar mielin.

myélinolyse centropontique ◇ **central pontine myelolysis** ◇ **mielinloezañ kreizpontel** Anaez dibaot, naous, *ent neuz-iadurel* dre ul lijorenn divielinaat e parzh kreiz ar pont, *ent klinikel* dre un azoniad gaouhirvelel hag ur pevarezezi.

myélite ◇ **myelitis** ◇ **melfo** g. **livennvelfo** g. Tanijenn ar mel a-livenn, anvad rumm un nebeut anaeziou : 1) *m. lemm askennus* pe *strewek* (Gl. *m. aiguë ascendante* pe *diffuse*), (sl. *Landry : maladie pe syndrome de ~*); 2) *m. lemm eskantet* (Gl. *m. aiguë disséminée*), (sl. *ataxie aiguë*); 3) *m. marvannus goulemm* (Gl. *m. nécrotique subaiguë, Sz. Foix-Alajouanine m.*), melfo o tevoudañ marvannad ar steuñvenn louet, oc'h erzerc'hañ dre un treuzezezi, dasstrizhek da gentañ, neuze gwak gant kaheristeñ hag o tedreñ d'ar marv dindan un pe zaou vloaz; 4) *m. diadreuz* (Gl. *m. transverse*), o tizhout a-strew ur rann eus ar mel kein-kroazlek, oc'h erzerc'hañ trumm dre un treuzezezi gwak gant steuz an damougoù a-stirenn, strafuilhoù teñvel ha direizhoù ar c'helc'hstrishaerioù.

myélite chronique interstitielle ◇ ◇ **melfo pe eskernvelfo henek entremezel** Furm eus ar mieloz angwetis, skleroz ar mel eskern, aloubet gant kelligoù histioidel, skoilhous ouzh paridigezh an hemati, ar granulokit hag ar pladanou.

NOTENN : En un darn vras eus ar yezhoù hag e TA, e tave ar stîrann *-myel-* war un dro d'ar mel a-livenn ha d'ar mel eskern. Daoust d'o evezh bras evit pourchas termenou sklaer ha diforc'hell, en dro-mañ ne zeuas ket aozerion ar PNA hag an TA a-benn da emglevout evit diraez an disparti geriadurel. Hiziv, evel kant vloaz 'zo, da intent *-myel-* n'eus da amoug nemet ar boazioù arverañ hag ar c'hemperzh. Neoazh, evit diren amsteriegezh termenou 'zo e kinnigan ouzhpennañ furmoù evel *livennvelfo*, *eskernvelfo* e-kichen *melfo*.

myélo-araphie ◇ **myelocèle** ◇ **melandlid** g., **melogad** g. Furm vuiek ar melvizlid, anvet ivez *spina bifida aperta* (sl. *myé-lodygraphie*).

myéloarchitectonie ◇ **myeloarchitectonics** ◇ **mielinadeiladezh** b. Studi staladur gwiennou mielin en amkan lakaat war wel trevnadur kelligou pluskenn an empenn (sl. *cortex cérébral*).

myéloblastes ◇ **myeloblasts** ◇ **mieloblast** s. Bongelligou an ac'had granulokitel, etre 20 hag 25 µm treuzkiz, bezant er mel eskern, o teverañ eus an hemokitoblast hag o treiñ e promielokit; glas sklaer eo o frotoplasm, ennañ greunennadoù azurlen; aozerion 'zo ne lakaont kemm ebet etrezo, ar c'helligou *kezik* hag al *limfoblast*; aozerion all a venn o diforc'hîñ dre o dazgweredoù enzimitek (galloud proteinloezañ hag oksidañ) a zo re ar steudad vieloidel end-eeun (sl. *cellules souches, granulocytaire : lignée* ~, *lymphoblastes*).

myéloblastomose, **myéloblastose** ◇ **myeloblastosis** ◇ **mieloblastoz** g. Seurtad leukemiezh lemm naouus dre neridigezh ar mieloblast.

myélobulbographie ◇ **myelobulbography** ◇ **melhîrvelluniñ** Skinluniñ ar mel a-livenn hag an hirvel (sl. *myélographie*).

myélocystocèle ◇ **myelocystocèle** ◇ **melusvollogad** g. **mielokistokel** g. **-ioù** Unan eus furmoù grevusañ a'r *spina bifida* diwar usvoll damel kanol greiz ar mel a-livenn, o tevoudañ astaloù diorreadur.

myélocytes ◇ **myelocytes** ◇ **mielokit** s. Kelligou 15 µm treuzkiz, etreat en ac'had ganulokitel d'ar promielokit ha d'ar granulokit oadour, leun endeo o frotoplasm gant greunennadoù neutro-, eozino- pe bazofil, nemet ez eo aront ha reoliek c'hoazh o c'hraoñell; ent reol e vezont er mel eskern (sl. *granulocytaire : lignée* ~, *myéloblastes*).

myélocytémie, **myélocytose sanguine** ◇ **myelocythaemia** ◇ **gwadvielokitegezh** b. Bezañs eus mielokit er gwad.

myélocytose ◇ **myelocytosis** ◇ **mielokitegezh** b. Bezañs eus mielokit en ur gwriad estreget ar mel eskern.

myélodysplasie ◇ **myelodysplasia** ◇ **1 livennvelviwe** g. **2 eskernvelviwe** g. 1 Mezhad ganedigel dister ha manet andeznaou o wariañ diorreadur ar mel alivenn hag a ve en orin kammeuziadoù (bizanskar, ezvoulc'h kanol ar grozell, distummadoù eskern an troad) ha direizhoù arc'hwele sellet alies evel bredanaezel (troazhandalc'h noz, mieraizioù en treid, ezrelderioù en damougoù. 2 Ezreolder ar mel eskern kiriek da wariadur ac'hadoù kelligou ar gwad.

myélodysraphie, **hydrorachis**, **spina bifida** ◇ **myelodysraphy**, **spina bifida** ◇ **melvizlid** g., **livennfoeñv** g., **spina bifida** Kammeuziad o c'hoarvezout eus ur skarr en ahel adreñv al livenn dre ziouer soutadur ar poentoù askornaat war un pe lies mellenn, hag oc'h ogañ drezañ, e rezh ur yoc'henn, ar pilhon, a-wechoù ar mel hag ur c'hodellad liñvenn benn-kein; ar furm eizhañ, ar melvizlid digor (*spina bifida aperta*), zo dezhi un erbedad grevus tre, dreist holl pa zec'han ur melpilhonogad (Gl. *myélo-méningocèle*) dibaot a wech kembezus gant ar bevañ; paotoc'h ha kuñv eo ar *melvizlid amguzh* (*spina bifida occulta*), hep ogad, ma chom skarr al livenn goloet gant ar c'hroc'hen (sl. *myélo-araphie*).

myélofibrose ◇ **myelofibrosis** ◇ **eskernvelfibroz** g., **mielofibroz** g. Tevadur fibrozal anneauenn wiennoù retikulin ha kollagen ar mel eskern, oc'h emastenn hag o treiñ e mieloskleroz gant steuzidigezh ar c'helligou, dic'henezhadur a stader er felc'husvent mieloidel, en anaezioù melneradel, er gwadnaouedoù (amwad angweel, leukemiezh vieloidel henek) hag e dassezioù kankrel ar mel (sl. *myélosclérose*).

myélogramme, **médullogramme** ◇ **myelogram**, **bone marrow differential cell count** ◇ **melrestrad** g. Discoc'h eus studi kementadel ha doareadel kelligou ar mel eskern, hemañ o vezañ erlamet dre ezwanañ diouzh ar glerenn.

myélographie ◇ **myelography** ◇ **livennvelluniñ**, **melluniñ** Skinluniñ ar mel a-livenn goude ensinklañ un Xdemerenn en erlec'h ouzh al liñvenn benn-kein er gavenn endan-gevnidek.

myéloïdes : lignées ou séries ~ ◇ **myeloid series** ◇ **ac'hadoù l. (g.)** pe **steudadoù l. (b.) mieloidel** Steudadoù a'r c'helligou yaouank o neriñ er mel eskern adal ar bongelligou, o tiforc'hekaat evit amparañ an ac'hadoù diforc'h o tisoc'h er furmoù oadour : hematî, leukokit greunek, pladanoù ha monokit (sl. *érythro-blastique pe érythrocytaire : lignée pe série* ~, *granulocytaire : lignée pe série* ~, *monoblastes, monocytes*).

myéloïdes : tumeurs ~ ◇ **myeloid tumours** ◇ **yoc'hennou mieloidel** Yoc'hennou evodet diouzh elfennoù eus gwriad lemm an eskern.

myélokathexie ◇ **myelokathexis** ◇ **melazgannad** g. Diouer dilaosk al leukokit greunek gant mel an eskern, a stader en *azoniad al leukokit diegus* (sl. *leucocytes paresseux : syndrome des* ~).

myéloleucémique ◇ **myeloleukaemic** ◇ **1 3 mieloleukemek** aa. **2 mieloleukemek** g. **-eion** 1 Gant al leukemiezh vieloidel. 2 Gouzviad al leukemiezh vieloidel. 3 A-zave d'al leukemiezh vieloidel (sl. *leucémie myéloïde chronique*).

myélolipome ◇ **myelolipoma** ◇ **mielolipom** g. Yoc'henn allec'hiat en uslounezhenn, dezhi neuz wiadurel ar mel eskern, puilh enni an druzkelligou hag ar c'helligou gwadparañ (sl. *hétérotopique*).

myéomalacie ◇ **myelomalacia** ◇ **melvlodad** g., **livennvelvlodad** g. Boukadur ar mel a-livenn, diwar anforzh un dalmerenn peurliesañ.

- myéломатозе** ◇ **myelomatosis** ◇ **mielomatoz** g. Anvad genadel an anaeziou naouus dre an uswe eus gwiad gwadparañ ar mel eskern, kevret gwech gant ar vezañs ezreol er gwad eus kelligoù a 'r steudad vieloidel (mielokit, hemati kraoñnellek, h.a.) ha gourelwenn (*m. leukemek*), gwech gant ur gwenriñv reol (*m. gouleulemek, m. anleukemek*) (sl. *lympho-matose*).
- myélome** ◇ **myeloma** ◇ **mielom** g. 1 Seurtad limfadenom naouus dre vuiegezh ar mielokit. 2 (Heñvelster : *osteomieliom*) yoc'henn yud evodet diouzh gwiad ar mel eskern.
- myéлоpathie** ◇ **myelopathy** ◇ **1 livennvelad** g. **2 eskernvelad** g. 1 Anvad genadel anaeziou ar mel a-livenn. 2 Anvad genadel anaeziou ar mel eskern.
- myéлоplaxes, ostéoclastes** ◇ **myeloplaxes, osteoclasts** ◇ **mieloplaks s., osteoklast** s. Kelligoù keurel lieskroañnellek eus ar mel eskern, dibaot gant an oadour bonan, niverus er yoc'hennoù gant *mieloplaks* (sl. *myéloplaxome*).
- myéлоplaxome, ostéoclastome** ◇ **myeloplaxoma, osteoclastoma** ◇ **mieloplaksom g. -où, osteoklastom g. -où** Yoc'henn, kuñv peurliesañ, a liv gell ruz, o wadañ aes, sezet war ar garvan (epuliz) pe war dalpenn an eskern hir, anezhi gwiad kenglenel yaouank gwazhiedek kenan gant mieloplaks a-strew ennañ (sl. *épulide*).
- myéлоpoïèse** ◇ **myelopoiesis** ◇ **melbarañ, eskernvelbarañ** Furmiñ kelligoù an ac'hadoù mieloidel.
- myéлоprolifératifs : syndromes** ~ ◇ **myeloproliferative syndromes** ◇ **azoniadoù melneriñ** Teskad ar c'hleñvedoù henek naouus dre an neradur kentael a neuz hanweel eus ar c'helligoù azv evodet eus un pe lies ac'had gwadparadel, hep skorted a 'r mel : leukemiezh vieloidel henek, leukemiezh vielomonokitel gant mielofibro, gwadtrombokitegezh hennadek ; kas a reont d'an andizh en ur ober un nebeut bloavezhioù, a-wechoù dre un treiñ e leukemiezh lemm mieloblattel.
- myéлосарcome** ◇ **myelosarcoma** ◇ **mielosarkom** g. Yoc'henn yud anaskorneiat evodet diouzh ar mel eskern.
- myéлосклэrose** ◇ **myelosclerosis** ◇ **mieloskleroz** g. 1 Skleroz strewek lec'hiet er mel a-livenn. 2 Stad dedreñ ar mielofibro, naouus dre aloubidigezh mel an eskern gant hordennoù stirek hag ar steuzidigezh dioutañ a 'r c'helligoù gwadparañ, kevredet a-wechoù gant un douesadur a 'n askorn (osteoskleroz) ; furmoù anezhañ eo ar *m. lemm* pe yud pe *mielofibro* *lemm*, leteñvel ouzh al leukemiezh lemm mieloblattel gant mielofibro, hag ar *m. lemm* gant *trewe mieloidel*, seurtad felc'husvent mieloidel terzhiennek gant amwad ha bezañs mieloblattel er gwad (sl. *myélo-fibrose, ostéopétreose*).
- myéлоscopie** ◇ **myeloscopsy** ◇ **melengweliñ, melwerañ** Ensellout ar mel a-livenn diwar-bouez un endoscop arbennik ebarzhet dre ezwanañ a-loan.
- myélose** ◇ **myelosis** ◇ **mieloz** g. 1 Anaez dic'henezhadel a 'r mel a-livenn. 2 Darallad ar mel eskern, kentael pe e dianlen ur poread pe ur pistriad (benzol, haliou aour, arsenik, skinadoù ionaus).
- myélose aplasique** ou **aplastique, myéлоptisie** ◇ **myeloptisis** ◇ **mieloz angweüs, meldizig** g. Furm violoz skoilhus ouzh arc'hweleioù gwadparañ ar mel ; gwech hollet, o tizhout furmidigezh an hemati, ar pladanoù hag ar granulokit (hollveldizig, Gl. *panmyéлоptisie*), gwech darnel (amwad, purpura, agranulokitoz).
- myélose érythémique aiguë, érythémie aiguë** ◇ **acute erythraemia** ◇ **mieloz elruz, elruz g. lemm** Anaez o tizhout ar vugale hag an oadourion, naouus *ent neuziadurel* dre uswe ar gwiad ruzparañ (mel eskern, avu, felc'h) hag un eritroblastoz muiek, *ent klinikel* dre un amwad grevus gant terzhienn didorrennek, avufelc'husvent, gwadliñvadoù hag un dedro d'an andizh en ur ober un pe zaou viz ; derc'hel a ra, er steudad ruz, al lec'h a zo d'al leukemiezh lemm er steudad wenn ; furmoù henek a zeskriver (*elruz henek*, Gl. *myélose érythémique chronique, érythroleucémie chronique*) ma stader, ouzhpenn, ur gouikter, laurioù eskern hag un diwezh feudek dindan daou vloavezh.
- myéлотомie** ◇ **myelotomy** ◇ **melenbenañ** Skejañ ar mel a-livenn a reer evit troc'hañ hentoù ar santout ; ergemennet eo bet ar *m. diadreuz* (Gl. *m. transversale*) pe *pañsenbenañ* (sl. *chordotomie*) hag ar *m. a 'r freilh* (Gl. *m. commissurale*) pe *freilhenbenañ* (sl. *commissu-rotomie*) o skejañ gwiennoù al laur hag an eraeziñ gwrezel e par o c'hrozizigell war-benn parraat ouzh grizisted al laur e kankroù al lestr.
- myéлотoxicose** ◇ **myelotoxicosis** ◇ **mielotoksikoz** g. Gwastadur ar mel eskern gant ur c'horf pistriek.
- myéлоtoxique** ◇ **myelotoxic** ◇ **1 eskernvelbistrius aa., melbistrius aa. 2 livennvelbistrius aa., melbistrius aa.** Argevezus ouzh ar mel 1 a 'n eskern 2 a-livenn.
- myéлотроpe** ◇ **myelotropic** ◇ **melgerc'h aa.** En araez da werediñ war ar mel.
- myentérique** ◇ **myenteric** ◇ **pervezkaherel** g. A-zave da gahersae ar pervez.
- myiase cutanée** ◇ **myiasis dermatosa** ◇ **miiaz g. kroc'hen** Dermatoz arveadel devoudet gant loc'hidigezh larved a seurtadoù dipter 'zo ebarzh ha dindan ar c'hroc'hen (sl. *larva migrans cutanée*).
- mylolyse** ◇ **mylolysis** ◇ **miloliz** g. Enloezad war gurunennoù an dent, o tizhout talbenn keharzañ ar malerioù ha ribl rez ar rakdent.
- myoblastes** ◇ **myoblasts** ◇ **mioblast** s. Kelligoù er rizhell en orin ar c'haherwiennoù.
- myocarde, TA myocardium** ◇ **myocardium** ◇ **kaher g. kalon, kalongaher** Kahersae ar galon, gwiennoù rizennek ouzh he ober, oc'h argezañ andiarvenn (sl. *fibre musculaire striée cardiaque*) ; *k. darviget* (Gl. *m. sidéré, Sz. stunned m.*), miarc'hwel darnel hag eiltroüs ent emdarzh a 'r c'hofig kleiz da heul un heskwad lemm anezhañ ; *k. goañvorus* (Gl. *m. hibernant, Sz. hibernating m.*), miarc'hwel darnel ha hirbad ar c'hofig kleiz da heul un heskwad eiltroüs hag un aderoueriañ ; dre ar skingannluniñ e c'haller lakaat war wel azgouestadusted an tachadoù heskwadet.

myocarde spongieux, non-compactation du ventricule gauche ◇ **spongy myocardium** ◇ **kalongaher spoueek, anstumm-aat ar c'hofig kleiz** Dreistpad, dibaot kaer, eus stad rizhellel ar c'haheer kalon stadet war ar bugel, o tec'han un naoued usvullus dezhañ un dedro arvarus; ar stenwerañ a ziskouez ur c'hofig kleiz kourzadekaet hag ar c'hofigluniñ bolc'hadennoù gwazhiedel kehent gant kavenn ar c'hofig, anezho ar skeudenn eus lennoù gwad e-barzh speur ar galon.

myocardie ◇ **myocardia** ◇ **miokardiezh** b. Anaez ar c'haheer kalon naouus dre usteñv ar galon hag ur falladur anezhi o c'h'hevusaat herrek, o tarvezout hep arbenn naouadus, kevret gant anaouf anfoel ar c'haheerwiennoù.

myocardiopathie, cardiomyopathie ◇ **myocardiopathy, cardiomyopathy** ◇ **kalongaherad g., kahernaoued g. kalon, kalongahernaoued g.** Anaez kentael grevus, familhel a-wechoù, ar c'haheer kalon, a ziforc'her ar furnoù-mañ anezhañ : 1) ur *furm usvullus* (Gl. *forme dilatée, Sz. congestive m., dilated m.*), naouus dre vuiaour ec'honad ar galon gant frankadur he c'havennoù ha moanadur he speurioù, o tedreiñ etrezek ur skorted kalon bloc'hel hag andireadus; 2) ur *furm argrennus* (Gl. *forme restrictive*), dibaot, gant adiaistol, a-geñver gant leiadur filusted ar c'hofigoù (amiloz); 3) ur *furm usventus* (Gl. *forme hypertrophique, Sz. hypertrophic m.*), gwech strewek, gant tevadur hollel speur ar c'hofig kleiz, gwech lec'hiek, kantet er gern pe dreist holl en dilhenn, oc'h amparañ neuze ar pevare *furm* : 4) *furm stevius* (Gl. *forme obstructive, Sz. hypertrophic obstructive m.*), naouus dre usvent muiek speur ar c'hofigoù, e par an dilhenn pergen, oc'h isvollañ ar gavenn da geñver ar sistol betek he dispartiañ e div gambr, ur gambr gernel uswassek hag ur gambr is-trapig uswassek; eznaou e-pad pell, e teu erzerc'h dre ur c'hevenkez hag ur migorvez, hag ez echu dre un andizh trumm; anezhañ un naoued a orin hilel; 5) ur *furm anvullus* (Gl. *forme oblitérante*), anavezotoc'h dre an anvad *enkalonnenfo Löffler* (sl. *endocardite de Löffler*).

myocardite ◇ **myocarditis** ◇ **kalongaherfo g.** Anvad rumm holl danijennoù ar c'haheer kalon; ar *furm* bennañ anezhañ eo *k. entremezel Fiedler* (Gl. *m. interstitielle de Fiedler*), en arguz e arbenn, allergek marteze, naouus dre un ensiladur limfokit, plasmokit, a-wechoù granulokit, er c'haheer kalon, o tarvezout gant an oadour yaouank, o tedreiñ herrek war-du ar skorted kalon hag ar marv.

myoclonie ◇ **myoclonia, myoclonus** ◇ **kahegrid g.** Argrezadoù a-daol, andiarvenn, heñvel ouzh stroñsadoù un tredansak, o tarvezout ent arreat er c'higennoù rizennek, naouus da nervanaezioù (empennaouedoù disurt, azoniad Lance-Adams, korea Bergeron, *paramyo-clonus multiplex*, h.a.); evit aozierion 'zo ez eo kenster *krid* ha *kahegrid*, endra amberz re all an termen *kahegrid* evit argrezadoù ur gigenn pe un hordenn gigenn, ha *krid* evit argrezadoù agedal ur stroll kigennoù, evel en droukfell (sl. *clonie, clonus, convulsion, myoclonie épileptique*).

myoclonie épileptique ◇ **myoclonus epilepsys** ◇ **krid an droukfell** Argrezad a-daol, taer hag arreat a 'r c'higennoù rizennek a-geñver gant ur vlivadenn feuls e neuron an empenn, bloc'hok ha daoudeuk en *droukfelloù hollek* (sl. *épilepsie généralisée*), lec'hiek en *droukfelloù annonel* (sl. *épi-lepsie focale*); en *droug bihan* (Gl. *petit mal*), kempred gant ar c'hridoù e tarvez bepred an un gwagennoù en empennvarvezad (liespikou, pikbaotou) (sl. *électroencéphalogramme, mal : haut pe grand* ~).

myoclonie-dystonie : syndrome de ~ ◇ **myoclonic dystonia** ◇ **azoniad kahegrid-midant** Kahegrid hennadek familhel kuñv treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, o teraouiñ er bugelvezh, o kevredañ stroñsadoù kaheer, ur midant a rizeh gant glaz ar skrivagnerion, hep strafuilh nerval nag ezreolder en imboure'hiñ amglinikel; direct gant an alkool hag o tedreiñ war well.

myoclonique vélopalatin : syndrome ~, nystagmus du voile ◇ **palatal nystagmus** ◇ **azoniad kridoù ar ouel, nistagmuz g. ar ouel** Stroñsadoù kahegridel er ouel stavn diouzh un talm, arstalek evit pep gouziviad, etre 120 ha 140 dre vunud, naouus d'un tizhad en hirvel, er pont pe en ilpenn, stadet ivez er skleroz strewek, en empennmelfo hag er pilhonfo empennmelel.

myocytes ◇ **myocytes** ◇ **miokit s., kahegellig b., kaheerwian b.** Kellig pe gwienn gaher (sl. *myoblastes*).

myodystonique : réaction ~ ◇ **myodystonic reaction** ◇ **erwez g. midantel** Dreistpad argrezadur lodenn grec'h ar gigenn d'risturiek da heul ar faradegañ, arouez bet deskrevet gant Söderbergh er miksedem ha gant Clovis Vincent en empennfo darreuziat.

myofasciite ◇ **myofasciitis** ◇ **kahefaskiennfo g.** Tanijenn ur gigenn hag ar faskienn anezhi.

myofasciite à macrophages ◇ **macrophagic myofasciitis** ◇ **kahefaskiennfo makrofagel** Kahernaoued foel, unanhangaeel damasar, a stader war an oadourion bet sanket en o c'higennoù vaksinoù oc'h enderc'hel aluminiom, naouus ent klinikel dre gaherostou strewek en izili traoñ, arzostou er c'henvelloù bras, asikted ha terzhienn; bevsav ar gigenn delta (lec'h ar sankadurioù) a laka war wel un amfud makrofag er c'haheer hag er faskienn.

myofibrille ◇ **myofibril, myofibrilla** ◇ **kaheerwian g.** Edañvenn danav, hir, argrezus, bezant e kitoplasm ar c'helligoù kaheer, stalet a-stur gant ahel bras ar gellig; er c'higennoù rizennek, e c'hoarvez ar *k.* a unvezioù argrezañ (Gl. *unités contractiles*) pe *sarkomeroù* (Gl. *sarcomères*), hanrannoù eus ar c'haheerwian loet etre div rizen Z (sl. *myofilaments*).

myofilaments ◇ **myofilaments** ◇ **kaherstellenoù** Hedadoù molekul oc'h amparañ ar c'haheerwianoù, daou seurtad anezho : ar re danav (molekul aktin), ar re dev (molekul miozin), o c'heneterikladur o vezañ gwikefre argrezañ ar gaherellig (sl. *actine, myofibrille, myosine*).

myogénique, myogène ◇ **myogenic, myogenetic, myogenous** ◇ **kaherien aa.** Er Vevedouriezh, a orin kaheerl.

myoglobine ◇ **myoglobin** ◇ **mioglobin g.** Kromoprotein kaheerl, anezhañ ur volekulenn hem erret ouzh ur polipeptid 153 amindrenkenn ouzh e ober, nes e luniad da hini an hemoglobin, o kadaviñ ent eiltrous an oksigen.

myoglobinurie ◇ **myoglobinuria** ◇ **troazhvioglobinegezh b.** Bezañs mioglobin en troazh, pe kentael : *t. grezvarrek hennadek* (Gl. *m. idiopathique paroxystique*), anaez dibaot, naouus dre barradoù kaheerost garv gant peluzioù, troazh gell, o tarvezout a-hed ar bloavezhioù, pe eilvedel : e dianlen un daraez (flastr, devad), un anforzh talmerel, ur poread, ur pistriad (sl. *Bywaters : syndrome de* ~).

myoïde ◇ **myoid** ◇ **kahervanek** aa. Gant neuz korrgreskerel ar c'haheer.

myokymie, **trémulation fasciculaire** ◇ **myokymia** ◇ **miokimiezh** b., **raskren** g. **duilhennel** Kefrouñ dizehan ur gigenn, hep loc'hañ ar rann ezel keñverek.

myologie ◇ **myology** ◇ **1 kigennoniezh** b. **2 Kaherouriezh** b. 1 Rann a'r gorfadurezh o plediñ gant ar c'higennoù. 2 Diskiblezh vezegele o plediñ gant kleñvedoù ar c'haheer, sk. : *Bonsav ar Gaherouriezh* (Gl. *Institut de Myologie*).

myolyse ◇ **myolysis** ◇ **kaherloezañ**, **kaherloez** g. Distruj gwriad ar c'haheer.

myomalacie ◇ **myomalacia** ◇ **kahervlodad** g. Dic'henezhañ ar c'haheer hag an treiñ anezhañ e gwriad kenglenel bouk, anaf a stader evel arlenad da angwazhiad ar c'haheer kalon pergen.

myome ◇ **myoma** ◇ **miom** g. Yoc'henn guñv a zaou seurtad : ar *rabdomiomoù*, dibaot kaer, anezho gwriad kaherel rizennek, al *leiomiomoù*, paotoc'h, kaherwiennoù levn ouzh o ober, sezet en organoù a zo enno kigennoù levn, evel ar grozh (sl. *fibromiome*).

myomectomie ◇ **myomectomy** ◇ **miomezvenañ** Lemel ur miofibrom dre hent ar gouin pe dre hent ar c'hof, hebiat d'ar grozh.

myomètre, TA **tunica muscularis uteri** ◇ **myometrium** & ◇ **kaher** g. **krozh**, **krozhkaher** g., **kahersae** b. **ar grozh** Kigenn ar grozh.

myométrial ◇ **myometrial** ◇ **krozhkaherel** aa. A-zave d'ar c'hrozhkaher.

myonécrose ◇ **myonecrosis** ◇ **kahervarvenañ**, **kahervarvenn** b. Marvenn ar c'haheer.

myœodème ◇ **myo-oedema** ◇ **daskrezell** b. Bos o tinodiñ war ur gigenn vas dre argrezadur lec'hel ar gwiennoù kaher en erwez ouzh ur skoad pe ur rimiad rust, anadenn a stader war un niver bras gouziviaded, war ar fallezheion pergen.

myopathe ◇ ◇ **1 kahernaouedek** aa. **2 kahernaouedeg** g. **-eion** **3 4 miopat** ag. & g. **-ed** 1 Gant ur c'haheernaoued 2 gouziviad ur c'haheernaoued 3 gant ar viopatiezh. 4 Gouziviad ar viopatiezh.

NOTENN : Sl. notenn an enmoned *myopathie primitive progressive*.

myopathie ◇ **myopathy** ◇ **1 kaherad** g., **kahernaoued** g. **2 miopatiezh** b. 1 Anvad rumm kleñvedoù ar c'haheer. 2 sl. *myopathie primitive progressive*.

myopathie à axe central ◇ **central core myopathy** ◇ **kahernaoued unvezon** Kahernaoued ganedigel treuzkaset er mod aotozomek gwech trec'h hek, gwech enkilek, naouus ent wiadurel dre un tachad ezreol unel (mezon) loet e-kreiz ar gaherwienn.

myopathie à axes multiples ◇ **multiple core or minicore myopathy** ◇ **kahernaoued liesmezon** Kahernaoued ganedigel treuzkaset er mod aotozomek ha marteze enkilek, naouus ent wiadurel dre lies tachad ezreol e-kreiz ar gaherwienn.

myopathie centronucléaire ◇ **centronuclear myopathy** ◇ **kahernaoued kreizkraoñnellek** Kahernaoued ganedigel treuzkaset er mod aotozomek trec'h hek, naouus dre neuz rizhellek ar c'haheerwiennoù a zo en o c'hreiz kraoñelloù stalet e rezh ristennoù ha dre un dedro goulerc'hat ha gorrek peurliesañ, erzerc'het dre dizhadoù e kigennoù diavaez al lagad.

myopathie primitive progressive ◇ **progressive muscular dystrophy** ◇ **kahernaoued kentael argammedek**, **miopatiezh** b. Anaez dic'henezhadel hêrezhel o teraouiñ peurliesañ en oad kentañ, naouus *ent klinikel* dre wanidigezh argammedek hag isteñv anat pe get strolloù kigennoù loet a-gemparzh, ar re gentañ tizhet o vezañ kigennoù gwriazienn an izili, *ent neuziadurel* dre anafoù kantet er gwriad kaher hep darallad naouadus en nerveg kreiz pe drobarzh; deskrevet ez eus bet lies furm hervez lec'h deroù an isteñv : *rizh gaousteñvel Duchesne* (Gl. *type pseudohyper-trophique de Duchesne*, an hini paoañ ha grevusañ (sl. *paralysie* ou *myopathie pseudohypertrophique*), ar *rizh Leyden-Mœbius* (sl. *Leyden-Mœbius : myopathie de ~*), *rizh fas-skoaz-brec'h Landouzy-Déjerine*, *rizh yaouerel Erb*, *rizh Gowers* pe *miopatiezh an eizhaennoù* (Gl. *myopathie distale*), h.a.

NOTENN : Lezet 'm eus an anvad *miopatiezh* war ar *c'haheernaoued kentael argammedek* en askont da dalvoud istorel an termen roet d'ar furm gentañ dizoloet eus ar c'hleñved.

myopathie thyrotoxiq ◇ **thyrotoxic myopathy** ◇ **kahernaoued skoedpistriek** Leidigezh ar c'higennoù e par gwriazienn an izili o tarvezout a-wechoù e-kerz kleñved Basedow, lodek en erzerc'hadoù ar skoedusvorc'hegezh (sl. *thyro-toxicose*).

myopathique ◇ **myopathic** ◇ **1 kahernaouedel** aa. **2 miopatek** aa. **3 miopatek** aa. 1 A-zave d'ar c'haheernaoued. 2 A-zave d'ar viopatiezh. 3 Gant doare ar viopatiezh; *enebrezh miopatek*, arvez dibarek o fas gant klañvourion ar furm viopatiezh *rizh fas-skoaz-brec'h Landouzy-Déjerine* : dremm treutaet, sonnet, diseblant, levn he c'hroc'hen, daoulagad digor frank gant malvennoù na beurserront ket, genoù ledanaet, muzellek, ar weuz uhelañ balirek, ar weuz izelañ ezriblet.

NOTENN : Sl. notenn an enmoned *myopathie primitive progressive*.

myopathique : réaction ~ ◇ **myopathic reaction** ◇ **erwez** g. **miopatek** Strafuilh dibarek eus tredanvroudadusted ar c'higennoù gant ar viopatek : isvroudadusted galvaniek ha faradek ar gigenn isteñvek, anezhi un direizh kementadel hep darallad doareadel a'n argrezañ.

myope ◇ **myopic** ◇ **1 isstiwel** aa., **isstiwel** aa. **2 isstiwel** g. **-eion** 1 Gant an isstiwel. 2 Gouziviad an isstiwel.

myopie ◇ **myopia** ◇ **isstiwel** g. Ezreolder hêrezhel gouskogañ al lagad, naouus dre gengerc'hañ ar skinoù luc'h en tu-kiz d'al luc'hsae e-maez an argeidañ hag, e derezioù uhel an direizh, daoust d'an argeidañ; peurliesañ ez eo naouus d'un ushed eus ahel a-saezh ar voull lagad (*i. ahelel*, Gl. *m. axile*); diforc'hiñ a reer an *i. kuñv* (Gl. *m. bénigne*), dindan 6 dioptri, hag an *i. yud* (Gl. *m.*

maligne), dreist 6 dioptri; hemañ, dibaot, a vez kevredet gant anafoù dic'henezhadel an deun lagad hag al lersae, an dolgennsae hag al luc'hsae, o trediñ da antevñ ar vegenn, d'un dardenn eus blein adreñv al lersae ha da rouestladoù grevus : dic'henezhadur a 'r gwereg, diflosk a 'l luc'hsae, ferennluc, gwadliñvoù en dolgennsae, glaokom.

myoplastie ◇ **myoplasty** ◇ **kigennatelveñ** Ratreañ pe asparañ kaherel diwar-bouez un tamm amprestet diouzh ur gigenn gefin; peurgटक, araezad amkanet da serriñ igorenn an ogad evit erougurañ an aveleñn a-vorzhed dre zanveziñ hordennoù tennet eus kigennoù an ardro.

myopotential ◇ **myopotential** ◇ **kahervarr** g. Gwered tredanel ar c'higennoù er paouez hag en argrezañ (sl. *electromyographie*).

1 2 myorésolutif, myorelaxant 3 myorésolutif ◇ **muscle relaxant** ◇ **1 istantus aa., darlaoskus aa. 2 istanter g. -ioù, darlaosker g. -ioù 3 darlaosker g. -ioù** 1 O tevoudañ distenn ar c'higennoù dre leiaat an tant anezho. 2 Lia istantus, darlaoskus. 3 Ent dibarek, rumm liaoù o tol'hañ an treuzkas nervenn-kaher dre werediñ war vuzerioù goudesinaps an aketilkolin, daou stroll anezho : 1) an *d. andivleinekaus* (Gl. *m. non dépolarisants*) pe *palikurariou* (sk. : an *D-tubokurarin*), ganto ur gwered kevezer war ar goc'henn goudesinaps (astalet o gwered pa gresk feur an aketilkolin), 2) an *d. divleinekaus* (Gl. *m. dépolarisants*) pe *leptokurariou*, ganto ur gwered ankevezer (sk. ar *suksinil-kolin*), liaoù arveret en diereazouriezh, evit kevaraezañ enpibadur ar vriant pe surjianerezh ar c'hof (sl. *curarisation, plaque motrice*).

myorrhaphie ◇ **myorrhaphy** ◇ **kigenndlita** Krafaelañ ur gigenn.

myosarcome ◇ **myosarcoma** ◇ **miosarkom** g. Anvad rumm ar yoc'hennoù yud evodet eus ar c'haherwiennnoù, rizennek (*rabdomiosarkom*) pe levn (*leiomiosarkom*).

myosclérose ◇ **myosclerosis** ◇ **mioskleroz** g. Darallad ar c'higennoù o vont war argalediñ, isteñvañ hag angrizañ.

myosine ◇ **myosin** ◇ **miozin** g. 1) *miozin A* pe miozin ent strizh : protein uhel bras e dolz mol, eus stroll ar globulineier, bezant er gwiad kaher (sl. *myofilaments*), 2) *miozin B*, pe *aktomiozin*, kemplezh diwar kevredad ar *m. A* gant ur protein kaher all, an *aktin* (sl. *actine*), pennaenn argrezusted ar c'higennoù; ergemennet eo bet dezventerezh skinhangaeel ar *m.* evit andalañ astenned marvenn ar c'haher kalon da heul an angwazhiad (sl. *cadavérique : rigidité ~, troponine*).

myosis ◇ **myosis** ◇ **mabisvoll** g. Strishaat ar mab lagad, pe bonan, dre benn an argeidañ pe dindan wered ar gouloù, pe lianiñvel, pe kleñvedel (strafuilh e nervaouerezh an envez) (sl. *myotique, réflexes pupillaires*).

myosite ◇ **myositis** ◇ **kaherfo** g. Tanijenn ar gwiad kaher; *k. askorneiat* (Gl. *m. ossifiante*), azveradur ar gwiad kaher rizennek o tisoc'h gant paotidigezh ar fibroblast ha treweadoù askorn, e dianlen un dараez peurliesañ; *k. askorneiat argammedek* (Gl. *m. ossifiante progressive*), anaez dibaot tre, dianav e arbenn, o teraouiñ er bugelvezh, naouus dre goeñvennoù liesel er c'higennoù rizennek, o trediñ ent argammedek etrezek an askorneiadezh hag o tisoc'h gant un arveudadur hollek eranvet "den maeneket"; *k. ebarzhennek* (Gl. *m. à inclusions*), oc'h anadiñ *ent klinikel* evel ur seurtad lieskahaerfo kaenharzus, naouus *ent wiadurel* dre ar vezañs eus danvezenn amiloidel er gwiennnoù kaher (sl. *amyloïde : substance ~, ossification*).

myotique ◇ **1 myotic 2 myotic drug** ◇ **1 mabisvollus aa. 2 mabisvoller g.** 1 O tevoudañ ar mabisvoll. 2 Danvezenn vabisvollus diounezet dre hent lec'hiek pe hollek, anezhi hogos bepred ur c'hollir enberet war ar gornsae.

myotome, myomère ◇ **myotome, myomere** ◇ **miotom g. -où, miomer g. -où** Steudad hanrannnoù a orin mezodermel stallet er rizhell en daou du d'ar ganol arc'hnerveg, pep hanrann o vezañ orin ar c'higennoù rizennek o tinodiñ etre div velenn diwezhel (sl. *métamérie, neurotome 1*).

myotomie ◇ **myotomy** ◇ **kigennenbenañ** 1 Skejañ surjianel ur gigenn. 2 Digeriñ ur gigenn, ent voas dre skarat he gwiennnoù, evit karzhañ ur gwatoñv, lemel ur yoc'henn guñv, diraez un elfenn neuziadurel donoc'h.

myotonie ◇ **myotonia** ◇ **miotoniezh** b. Strafuilh an tant, naouus dre c'horregezh ha diaester an diargrezañ da geñver ar fiñval diarvenn, ar fiñvoù diarzoug pe gouzañvat o chom diangorzh; dre ar c'hahervarrwezañ e stader boleadoù barroù gwered oc'h anadiñ trumm hag o tigriskiñ ent argammedek o heled hag o zalm, an *diskarg miotonek* eo (Gl. *décharge myotonique*), delanket gant ar broudad kaherel, ar yenion, h.a. (sl. *myotonique : réaction ~, paramyotonie*).

myotonie acquise, maladie de Talma ◇ **Talma disease** ◇ **miotoniezh arzeuat, kleñved Talma** Anaez berrbad, kuradus, naouus dre un erwezh miotonek ha glazoù o tarvezout goude strivoù hirbad.

myotonie atrophique, maladie de Steinert ◇ **myotonic atrophy** ◇ **miotoniezh isteñvel** Anaez hêrezhel aotozomek trec'hek, gant erzerc'haat daskenek, loet ar c'henenn anezhañ war ar c'hromozom 19, naouus war un dro gant doareoù ar viotoniezh ha doareoù ar c'hahernaouedoù : en eizhañnoù e teraou an isteñv kaherel hag hollekaat a ra gorrek tre; stadañ a reer ouzhpenn se un azoniad mideñvel : ferennluc a-gaenenn, strafuilhoù enborc'hadel (skorted klidennel), pennsac'h, moalded kontrat, tizhad ar c'haher kalon (mire).

myotonique : réaction ~ ◇ **myotonic reaction** ◇ **erwezh** g. **miotonek** Strafuilh e tredanvroudadusted ar c'higennoù, o c'hoarvezout a zaskemmoù *doareadel* e furn an argrezadoù, gorrekoc'h da zeraouiñ ha da baouez (dreistpad ar galvanotonuz goude astal ar red tredan), ha *kementadel* : muiat ar vroudadusted galvaniek ha dreist holl faradek, a-c'hin d'ar pezh a stader en erwezh dic'henezhadur (sl. *réaction de dégénérescence*).

myotonomètre ◇ **myotonometer** ◇ **tantventer** g. -ioù Ardivink amkanet da vuzuliañ an tant (sl. *tonus musculaire*).

myringite ◇ **myringitis** ◇ **tabouinfo** g. Tanijenn an daboulin.

NOTENN : Ul linkrad eus Gr. *μῆνιγγ-*, bet dezneziet reizh en Et. *mening-*, eo Et. *myring-* a gaver amañ.

myringotomie ◇ **myringotomy** ◇ **taboulinenbenañ** Skejañ lienenn an daboulin (sl. *paracentèse*).

mytacisme ◇ **mytacism** ◇ **mefleañ** Mezhad distagañ, erlec'hiañ ar soniadoù [m], [b], [p] ouzh soniadoù all.

1 2 mythomane, mythomaniaque 3 mythomaniaque ◇ **mythomaniac** ◇ **1 gaouvariad** aa. **2 gaouvariad** g. -ed **3 gaou-vare** aa. 1 Gant ar gaouvar. 2 Gouziviad ar gaouvar. 3 A-zave d'ar gaouvar.

mythomanie ◇ **mythomania** ◇ **gaouvar** g. Tued breckkleñvedel da zistresañ ar wirionez, da liveañ gevier, da steuñviñ istorioù faos, da zarneuziañ kleñvedoù (sl. *fabulation, Lasthanie de Ferjol : syndrome de ~, Münchhausen : syndrome de ~, simulation*).

mytilisme ◇ **mytilotoxism** ◇ **mesklegezh** b. Pistriadur gant ar meskl, o tarvezout abred goude an euvradur hag oc'h erzerc'hañ dre gammeraezioù en eizhaennoù, klopennad, seizi en izili hag a-wechoù e kigennoù an analañ, dezhañ un dedro azoù.

mytilotoxine ◇ **mytilotoxin** ◇ **mitilotosin** g. Toksin nervgerc'h, gwrezharzus, borc'het gant flagelleged 'zo (*Gonyaulax*) eus ar plankton (kiriak d'al "lanvou ruz"), en araez, ur wech euvret gant ar meskl, da zevoudañ ar vesklegezh.

myxochondrome ◇ **myxochondroma** ◇ **miksokondrom** g. Yoc'henn gemmesk, gwiad migorn ha gwiad glaourgenn ouzh he ober, o tedeñ alies evel ur yoc'henn yud.

myxœdème ◇ **myx(o)edema** ◇ **miksedem** g. Anaez naouus *ent klinikel* dre ensiladur glaourel an amwiskadoù, gorrekadur an holl arc'hwelioù, direizhoù kefredel, yenegezh ha, gant ar bugel, astal an diorreadur hag ezvezañs ar gaezouregezh; an arbenn anezhañ eo astal arc'hwelañ ar skoedenn, erzerc'h *ent vevoniel* dre wadvec'h diflosket an hormonoù skoedennel ha lenadur mannel ar skiniod ouzh ar skoedenn; tri seurtad miksedem a zeskriver : 1) *m. emdarzh an oadourion* (Gl. *m. spon-tané des adultes*) pe *fallezh troc'hgennel* (Gl. *cachexie pachydermique*); 2) *m. ganedigel* (Gl. *m. congénital*) pe *diodezh viksedematus* (Gl. *idiotie myxœdémateuse*), e dianlen ezvezañs c'hanedigel ar skoedenn; 3) *m. oberatael* (Gl. *m. opératoire*) pe *fallezh ol-skoedennel* (Gl. *cachexie strumi-prive*) (sl. *Hashimoto : goître lymphomateux de ~, hypothyroïdie, thyroï-diennes : hormones ~, thyroïtrophe : hormone ~, thyroïstimuline*).

myxœdème cutané circonscrit ou atypique ◇ **pretibial myx(o)edema** ◇ **miksedem kroc'henel kantet** pe **anrizhek** pe **rakskinel** Kleñved kroc'hen dibaot hep keñver gant skorted ar skoedenn, a zeskriver daou seurtad anezhañ : 1) al *liken miksedematus*, naouus dre grugennoù roz eskantet hag a-wechoù un ensiladur kroc'hen a-ledadoù hag un eritem, en ervez da zedreñ d'ur fallezh varvus; 2) ar *miksedem kantet rakskinel* (pe *kleñved Keining-Cohen*) o tarvezout e souzvezh ur prederiadur skoedisvorc'hañ war ur bazdoveg, naouus dre ozvennoù tev pe plakadoù balirek, direoliek, persdu, pe dre un elefantiaziz a 'n divesker, warnañ ur c'hroc'hen torgennek, amstruzhek, damlouet.

myxomatose ◇ **myxomatosis** ◇ **miksomatoz** g. Kleñved diwar ur poksviruz, o tizhout ar c'honikled, antredizhus d'an den, naouus dre an dispakadur eus miksomoù niverus.

myxome ◇ **myxoma** ◇ **miksom** Yoc'henn o c'hoarvezout a wiad glaourgennel.

myxorrhée, mucorrhée ◇ **myxorrhoea** ◇ **glaourver** g. Naouez glaour puilh.

myxosarcome ◇ **myxosarcoma** ◇ **miksosarkom** g. Yoc'henn yud amparet gant lies seurtad gwiadoù, en o zouez gwiadoù glaourgennel ha sarkomatus.

Myxovirus, Orthomyxovirus ◇ **Myxovirus, Orthomyxovirus** ◇ **Myxovirus, Orthomyxovirus** Anv a voe roet da gentañ da viruzoù eus kerentiad an *Orthomyxoviridae*, a denn o anv eus o c'herc'husted d'ar mukoproteinou.

Myxovirus influenzae ◇ **Myxovirus influenzae** ◇ **Myxovirus influenzae** Viruz ar grip, deanvet bremañ *Influenzavirus* (sl. *grippe*).

N

Naboth : œufs de ~ ◇ **nabothian kysts** ◇ **kistoù** l. (g.) **Naboth** Kistoù bihan glaourel diwar steviadur ar c'hanolioù degorzhañ eus gwagrennoù gouzoug ar grozh.

Nadler, Wolfer et Elliot : syndrome de ~, **hépatome hypoglycémiant** ◇ **Nadler-Wolfer-Elliot syndrome, hypoglycemic hepatoma** ◇ **azoniad Nadler-Wolfer-Elliot, hepatom glukozwadisvec'hius** Azoniad dibaot, anezhañ hepatom kentael gant ur gourev dreist 40 vloaz kevret gant ur gwadisvec'h glukoz hep gwadusvec'h insulin, naouus dre ziaezadoù war c'hrevusaat, o tedeñ etrezek an andizh dre skorted avu; dianav e chom ar c'heñver etre kankr an avu ha kouezh ar feur glukoz (sl. **hépatome**).

NADPH oxydase ◇ **NADPH oxidase** ◇ **NADPH oksidaz** (Stumm kurzhet eus *nikotinamid adenin, dinukleotid fosfat oksidaz*) Enzim o tasperzhiañ e distruj ar bakteri; diouerñ a ra er *granulomatoz lestel argammedek* (sl. **granulomatoze septique progressive**).

Naegleria ◇ **Naegleria** ◇ **Naegleria** Genad amoeb o vevañ en dour chag, en araez, ent nemedennek, da zevoudañ ur pilhon-empennfo dezhañ un erdebad arvarek.

nævomarcinome, mélanome (malin) ◇ **n(a)evomarcinoma, (malignant) melanoma** ◇ **melanom g. (yud), nevakarkinom g.** Epiteliom a yuter bras, livegat alies, evodet diouzh an nevuzioù nevakelligel, dezhañ lies furm : bas aloubus (60 %), evodet diwar melanom Dubreuilh (20 %), ozvennek gant dedro yoc'hennel herrek (20 %) (sl. **mélanome, mélanome de Dubreuilh**).

nævomatoze basocellulaire ◇ **basocellular n(a)evomatosis, Gorlin-Goltz syndrome** ◇ **nevomatoz g. diazelligell, azoniad Gorlin-Goltz** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, lieslec'hiat : anafoù kroc'h en o tinodiñ er bugelvezh hag o tic'henezhañ alies en epiteliomou diazelligell, kevredet alies gant direizhoù all kroc'h enel (porokeratoz palv-sol), askornel (kistoù er garvan dreist holl), nervel (medulloblastom), dibaotoc'h ganadel, enborc'hadel, lagadel; gant aozerion 'zo e vez renket ar *n. d. e-touez* ar fakomatozioù (sl. **phacomatose**).

nævus (l. : **nævus**) ◇ **naevus** (l. : **naevi**), **Sz.Am. nevus** (l. : **nevi**) ◇ **nevuz g. -ioù** Ezreolder kroc'h ena orin rizhellel, ledek pe ledekoc'h, bepred kantet avat, trebadek pe dedroat gorrek tre, kevredet a-wechoù gant miweoù kroc'h enel pe flugezel all; ent klasel, e tiforc'her 1) an *nevuzioù eeun* amparet gant elfennoù reol eus ar c'hroc'h en, is- pe usweek, hep tued d'an dic'henezhañ yud, anezho an *n. ezkroc'h enel*, an *n. kenglenel*, *n. an adparzhioù* (gwagrennoù c'hwezparañ), an *troc'hgennoù rannbarzhel*, an *angiomou*, an *n. angweel*, 2) an *nevuzioù nevakelligel*, livegennek pe get, a zo enno elfennoù ezreol, ar c'helligoù nevuzel, en ervez da zedreñ etrezek un anaf a yuter bras, ar melanom (deanvet *nevokarkinom* kent 1994) (sl. **mélanome**).

nageurs : dermatite ou **gale des** ~ ◇ **swimmer's itch** ◇ **kravien g. an neuñvierion** Eritem debronek e dianlen trebarzherezh ar c'hroc'h en gant kerker skistozom.

naïf ◇ **naive** ◇ **krai g.** Nad eo bet c'hoazh na danzeet, na blivaet, na daskemmet, nag arwerc'het; sk. : al limfokit T krai : ar re n'o deus ket kediet c'hoazh gant un antigen.

naissance ◇ **birth** ◇ **genel, ganedigezh b.** Deroù an hoali goude ezvountadur eus korf ar vamm, sk. : *reoliñ ar genel* (Gl. *contrôle des naissances*) (sl. **planification familiale, viabilité**).

nalorphine ◇ **nalorphine** ◇ **nalorfin g.** Deverad diouzh ar morfin, usreer an analañ oc'h enebñ ouzh gwered isreüs ar morfin.

nanisme ◇ **dwarfism, nanism** ◇ **korrded b.** Skorted ar savder, izeloc'h a 2 forc'had rizh eget savder keitat an hiniennou kenoad, anezhi pe bihanded eus ar c'horf a-bezh, kengannus, *korrgorfegezh*, (sl. **microsomatie**), pe eus hanrannoù 'zo anezhañ hepken (sk. an *ezelished*, sl. **micromélie**), hep skorted vevedel, bredel pe revel (e kemm ouzh ar vulgelvanegezh, sl. **infantilisme**); lakaet e vez an anvad *korrded* war lies azoniad, a ziforc'her dre un hogozenn : *k. hennadek* (Gl. *n. essentiel*), ma chom reol ken ar c'henfeur etre parzhioù ar c'horf, ken an arc'hwelioù bevedel ha bredel; *k. vezomelek* (Gl. *n. mésomélique*), miwe treuzkaset er mod aotozomek enkilek, naouus dre verred ar rakyrec'h hag ar c'har, ha *k. akromezomelek* (Gl. *n. acromésomélique*), gant berrded an dorn hag an troad ouzhpenn; *k. diastrofek* (Gl. *n. diastrophique*), treuzkaset ivez er mod aotozomek enkilek, naouus dre strafuilhoù ar c'hreskiñ, anat adal ar c'hanedigezh hag o tisoc'h gant ur gorrded ezelishedek muiek ha kammneuziadoù liesseurt, renket e-touez ar migornvideñvoù, (sl. **chondro-dystrophie**); *k. kaenuslounezhel* (Gl. *n. corticosurrénal*), devoudet er bugel gant ur gaenusvorc'hegezh emdarzh (sl. **Cushing** : *maladie de* ~) pe mezegien (da heul diounit digerreizh kortikoidoù); *k.*

gonadien (Gl. *n. gonadique*), e ser ar gaezourezh kentrat, an hormonou gourel ha benevel o c'hevennañ ar c'hougorfenn hag oc'h astaliñ ar c'hresk; *k. c'hougorfennel* (*n. hypophysaire*), diwar skorted ar somathormon, kevret alies gant ur vugelvanegzh diwar skorted ar gonadotropinoù, a-wechoù e dianlen ur yoc'henn er rannbarzh gouzerc'hvel-gougorfenn; *k. viksedematus* (Gl. *n. myxœdémateux*), stadet e-kerz miksedem kentrat ar bugelvezh; *k. lounezhien* (Gl. *n. rénal*), a-geñver gant ul lounezho henek a'r bugelvezh, kevret alies gant arouezioù bugelvanegzh; *k. trunkus* (Gl. *n. thanatophore*), furm eizhañ ar migornvideñv, digembvus (sl. *achondrogenèse, chondrodistro-phié*); *k. penn labous* (Gl. *nanisme à tête d'oiseau*), korrded ganedigel, dianav e orin, naouus dre zilerc'h azvedigezh an eskern hag ezreolderioù neuziadurel e par ar c'hlopenn hag ar fas (dremm strizh, tal arblat, daoulagad bourbellek, fri balirek e stumm ur pigos, elgez puket); *k. gargoulek* (Gl. *nanisme à type de gargouille*) (sl. **Hurler** : *maladie pe syndrome de* ~).

nanocéphalie ◇ **nanocephalia** ◇ **korbbenegzh** b. Bihanded ar penn en e holl ventoù pe diouzh treuzkizoù 'zo hepken.

nanogramme ◇ **nanogram** ◇ **nanogramm** g. Unanenn dolz, arouez ng, 10⁻⁹ g, eleze milmilionvedenn gramm.

nanomélie ◇ **nanomelia** ◇ **korzezelegzh** b. Berrded ezreol (korrded) un pe lies ezel, en o fezh pe en un hanrann anezho.

nanomètre ◇ **nanometer** ◇ **nanometr** g. Unanenn regad, arouez nm, 10⁻⁹ m, eleze milmilionvedenn metr.

narcissisme ◇ **narcissism** ◇ **narkisegezh** b. Termen bredelfennadel o tec'heriañ bodadoù kealioù deveret diouzh an despizadur savet gant Freud e 1910 : “karantez ouzh ar skeudenn an unan”; e dibenn e remzad e kevenebe un *narkisegezh kentael*, anergerc'h-ennek (Gl. *objectal*), ma annod ar bugel e libido a-bezh ennañ e unan, hag un *narkisegezh eilvedel*, ma tistro al libido annodet en ergerc'henn etrezek ar *me*, bet furmet dre an hevebebiñ ouzh an ergerc'henn; korvoet e voe an devoud-mañ diwezhañ gant Lacan pa savelas ergraf *pazenn an drec'h* (Gl. *stade du miroir*) : kentoc'h eget a *hevelebiñ narkisek*, e ra anv eus *hevelebiñ ouzh skeudenn e getpar* a ve ar c'hentañ kammed eus furmidigezh ar *me* evit ar maban (sl. *libido, objectal*, GBLF §§ 785, 786, 1254).

narcoanalyse ◇ **narcoanalysis** ◇ **morzelfennerezh** g. Hentenn vredevezeg kentradet e 1930, dilezet hiziv, a c'hoarveze a sankañ er wazhienn un huneiad (barbitureg kevall, seurtanvet “serom a wirionez”) ha gounit korvo gant an dargud evit ober d'ar gouziviad diraez eñvoradoù diskaset.

narcolepsie ◇ **narcolepsy** ◇ **hunfell** g. Tued andistrec'h da gousket o tarvezout dre varradoù, gwech hennadek, kevredet gant an darsouz (sl. *cataplexie*), anvet neuze *kleñved Gélinau* (Gl. *maladie de Gélinau*), gant an *hunbeluz* (sl. *paralysie du sommeil*) hag an *trezerc'hioù enhunel* (sl. *hallucination, hypnagogique*), gwech, aliesañ, azonek (yoc'hennou empenn, daraez klopenn, border, diabet, droukfell) (sl. *hypersomnie, Pickwick* : *syndrome de* ~).

narcomanie ◇ **narcomania** ◇ **hungaezh** g., **hungaezhiadezh** b. Estoue ouzh an hunwezherioù.

narcose ◇ **narcosis** ◇ **hunwezhiñ, hunwezh** g. Kouskediñ kalvezadel.

narcothérapie, cure de sommeil ◇ **narcotherapy, continuous sleep therapy, sleep treatment** ◇ **hungurañ, hungur** b., **kur** b. **gousked** Hentenn yac'haat ar gouvidoù enkrezel, bet kentradet er bloavezhioù 1920, anezhi derec'hel kousket ar gouziviad diwar-bouez hunwezherioù etre 15 hag 20 eurvezh diwar 24 e-doug 10 pe 15 devezh; kalvezder hogos dilezet abaoe donedigezh ar bredwezherioù.

narcotinienn ou **psilocybienn** : **syndrome** ~ ◇ ◇ **azoniad psilokibel** aa. Teskad ar strafuilhoù kentrat diwar euvriñ foue eus ar genadoù *Psilocybes, Panaeolus, Pholiotina, Stropharia*, enno ar *psilokibin*, bader o werediñ war buzerioù ar serotonin, 1) azoniad kreud- ha bredanaezel o tarvezout alies goude ar gemeradenñ gentañ : heugennoù, c'hweladoù, klopennadoù, tolren, mabusvoll, gourboz, uc'heraez gwelad, kleved ha stekiñ, glizi, ezaouiñ egoramzerel, trezerc'hadoù; 2) a-wechoù, e-lec'h ar souzadur, e stader un *azoniad goudetrezerc'hadel dreistpadus* (Gl. *syndrome post-hallucinatoire persistant*), ouzh e ober arurioù, gwaskadoù enkreuz, arluzegezh, skouladoù gouvid, kaouadoù ambren lemm o rekizañ ur prederiañ bredvezeg; ekeñver lezenn e Frañs, ez eo kospadus ar c'herzañ foue trezerc'hieat (diferad an 22 C'hwevrer 1990).

narcotique ◇ **narcotic** ◇ **1 morzus** aa. **2 morzer** g. -ioù 1 2 O tec'han an dargud, an darlaosk kaherel, soc'hadur an eraeziñ o vont betek an aneraez (sl. *analgsiques narcotiques*).

NOTENN : Evezh zo da deurel ouzh arver Sz. *narcotic* evel kenster da *stupefacient* (Br. *badus, bader*, Gl. *stupéfiant*), sl. La-10 163-164.

Narula : **test de** ~ ◇ **Narula's test** ◇ **prouad** g. **Narula** Prouad embreget e-kerz erc'hwilierezh enkavennel an hordenn gentez-kofig amkanet da ziournat orin un ezwal, anezhañ delankañ ent kalvezadel argrezadoù ar c'hentez : ent reol goude astal an tredanfraouaat e c'hoarvez ur paouez godel; diwar uspad hemañ e tezreer ez eo darallet emgefren ar god (sl. *bloc sino-atrial, His* : *faisceau de* ~).

nasal : **point** ~, **nasion** ◇ **nasal point** ◇ **poent friel, nazion** Poent loet e gwirizenn ar fri e kreiz ar vellez tal-fri.

NASH ◇ **NASH** ◇ **NASH** (Gwreskanv Sz. *nonalcoholic steatohepatitis*, Br. *steatozavufu analkoolel*) avufo steatozel a orin analkoolel a stader alies e tro an insulinharzusted; ezaou epad pell, a-wechoù rouestlet gant arouezioù gwiadurel an danijenn, ar fibroz hag ar c'helligloez, en ervez da zedreñ etrezek ar c'hirroz.

nasopharyngien : **polype** ~ ◇ ◇ **polip** g. ar **frec'hargaden** Fibrom ensteudet war dalbenn traoñ ar genneg, a stader war ar baotred etre 15 hag 20 vloaz, en ervez da yutaat (sl. *cavum*).

natalité ◇ **natality** ◇ **feur** g. **genel** Keñver etre niver ar ganedigezhioù ha niver ar boblañs e-doug ur pad savelet.

natrémie ◇ **natraemia** ◇ **gwadvec'h** g. **natriom, natriomwadvec'h** g. Feur natriom er gwad, ent reol ez eo 142 mmol/l (3,25 g/l) plasma.

natriurèse, natriurie, natrurie ◇ **natriuresis** ◇ **troazhvec'h** g. **natriom, natriomdroazhvec'h** g. Feur natriom en troazh, ent reol etre 120 ha 150 mmol dre 24 h.

natriurétique ◇ **natriuretic** ◇ **1natriomdroazhadel** aa. **2 natriomdroasheiat** aa. **3 natriomdroasheiad** g., **holenusvorc'h-er** g. 1 A-zave d'an dioulañ natriom. 2 O vuiaat an dioulañ natriom. 3 Aozad natriomdroasheiat (sl. *diurétique, facteur digitalique endogène, facteur natriurétique auriculaire*).

naturopathie, naturothérapie ◇ **naturopathie** ◇ **naturopatíezh** b., **naturgurañ, naturyac'haat** Mezekniezh dazeilat amc'houlus d'ur meizadur holladelour oc'h ergemenn prederiañ dre araeziou lavaret "naturel" : elfennoù struzhel ha fizikel, hanrenoù emvevañ ha kement pleustr ankalvezadel amkanet da zerc'hel ar c'hempouez bevedel ha bredel.

naupathie ◇ **naupathia** ◇ **teadell** b. Droug an dezougen : droug mor, droug karr, droug nij, h.a. (sl. *antinaupathi-que, transport : mal des* ~).

nausée ◇ **nausea** ◇ **heugenn** b. C'hoant c'hweliñ.

NOTENN : An daou dermen Gl. *naupathie, nausée*, bet dezneuziet diwar Gr. *naúš* "ælestræ, a zavee da gentañ d'an droug mor.

naviculaire, TA os naviculare ◇ **navicular** ◇ **bulzuneg** g. [Anvad kent : Gl. *scaphoïde tarsien*] Askorn eus renkad arakoc' (Gl. *tarse, TA tarsus*), loet etre an askorn fer (Gl. *astragale, TA talus*) en adreñv hag an diñseg (Gl. *cuboïde, TA os cuboïdeum*) en diavaez.

Naxos : maladie de ~ ◇ **Naxos disease** ◇ **kleñved Naksos** Anaez familhel bet deskrevet e 1986 en enezenn c'hresian Naksos, kevreted ur c'heratoz palv-sol hag ur miwe migorveseiat a `r c'hofig dehou.

1 néarthrose, pseudarthrose 2 néarthrose ◇ **1 ne(o)arthrosis, pseudarthrosis 2 ne(o)arthrosis** ◇ **1 nevezkenvell g., gaougenvell g. 2 nevezkenvell** 1 Kenvell nevezfurmet etre an daou damm eus un askorn bet torret pe dazbidet. 2 Deavad miret gant aozerion `zo evit ar c'henvelloù nevez goude dazbidañ.

neck-tongue : syndrome ~ ◇ **neck-tongue syndrome** ◇ **azoniad gouzoug-teod** Laur gouzoug kevret gant hourzadur ar gouzoug hag an teod o tarvezout da heul amwaskañ an eil gwrizienn c'houzoug dre weañ trumm ar gouzoug.

nécrobiose ◇ **neobiosis** ◇ **gouvarvennañ, gouvarvenn** b. Daskemm o c'hoarvezout gant un organ pe un tachad organ steuziet an eroueriañ ennañ ha gwarezet ouzh ar poreañ ; gougemeret e vez gant ar bevedeg ar parzhioù tizhet nemet e tarvez ganto un argizad gwiaidurel, sk. : g. *an empenn, al lounezh, ar felc'h* e dianlen un angwazhiad.

nécrobiotique ◇ **neobiotic** ◇ **1 gouvarvennek** aa., **gouvarvennet** aao. **2 gouvarvennel** aa. 1 Gant ar gouvarvennañ. 2 A-zave d'ar c'houvarvenn.

nécrophagie, ptomaphagie ◇ **nerophagia** ◇ **kelanezadezh** b. Er vredkleñvedouriezh, furm sadegezh naouus dre an tech da zebrañ kig ar c'helanoù ; bredelfennerion `zo (Abraham) a wel eno un argizañ d'ar bazenn c'henaouel hag anv a ra eus ur bazenn c'henaouel-sadek (Gl. *stade sadique-oral*) pe kanibalek (sl. GBLF §§ 163, 164, 1260).

nécrophilie ◇ **nerophilia** ◇ **kelanoriadezh** b., **kelanvlisa, kelanvlisadezh** b. Er vredkleñvedouriezh, furm sadegezh naouus dre an tech da glask bliz revel ha da embarañ gant ar c'helanoù.

nécrophobie ◇ **nerophobia** ◇ **kelanarur** g. Amgren mac'hennak rak ar c'helanoù.

nécrose ◇ **nerosis** ◇ **marvennañ, marvenn** b., **marvennad** g. Astal kleñvedel ha diwezhel argerzhioù ar beved en ur gellig pe ur gwiaid etre elfennoù all manet bonan, hag an treuzfurmadou gwiaidurel ha korfadurel dianlenat ; er c'halonvarrezañ, e reer *marvennad* eus derez eizhañ gouzañvder ar c'haher kalon da heul steviadur ar gurunerenn gant distruj ar c'haherwiannoù e gounid ur gwiaid anniñv ent tredanel, erzerc'het gant steuz ar wagenn R, amsavet gant ur wagenn Q pe troet en ur wagenn QR.

nécroctisme ◇ **necroctism** ◇ **marvenndrevn** g., **marvenndrevnegezh** b. Kimidrevn leukokitel devoudet gant marvenn ar c'helligoù.

(-)**nécro-**

• *acné nérotique* akne varvennek • *angine ulcéronérotique* gorank angreizmarvennek • *artériolite nérosante* talmerennigfo marvennus • *autopsie, nécropsie, néroscopie* kelanskejañ, kelanweliñ • *cirrhose postnérotique* kirroz dianvarv-ennad • *entérocolite nérosante* hollbervezfo marvennus • *érysipèle nérotique* tangouez marvennus • *facteur nérosant des cellules malignes* parenn varvennus ar c'helligoù kankrel • *foyer qui peut se nécroser ou disparaître* annon en ervez da varvennañ pe da steuziañ • *insectes nérophages* amprevaned kelanezat • *lésion dégénérative inflammatoire, nérotique* anaf dic'henezhadel foel, marvennel • *mode d'altération nucléaire en cas de nécrose cellulaire* mod displeberañ ar graoñell da geñver marvennadur ar gellig • *nécrose des tissus* marvennadur ar gwiaidoù • *nécrose musculaire étendue* marvennad ledek ar c'haherioù • *nécrose tumorale* yoc'hennvarvennañ • *œdème nérotique* gouliñv marvennek • *ostéonécrose* askornvarvenn • *papulonécrotique* krugennmarvennek • *portion d'os nérosée* tamm askorn marvennet • *se nécroser* marvennañ • *tissus nérosés* gwiaidoù marvennet • *zone de nécrose hémorragique* tachad marvenn wadliñvel.

-**nect-**

• *appareil atrionecteur* benvegad kentezaoter • *appareil ventriculonecteur* benvegad kofigaoter • *connectivite* kenglennaoued, konnektivit • *connecter deux électrodes* kennaskañ daou elektrod • *déconnection neurovégétative* digennaskañ nervstruzhel • *fibronectine* fibronektin • *syndrome de déconnexion interhémisphérique* azoniad an digennaskañ etre-hanterennoù • *système cardionecteur* trevnad kalonaoter • *tissu cardionecteur entre le nœud sino-atrial et la division du faisceau atrioventriculaire* gwiaid kalonaoter etre ar c'hloam god-kentez ha kavaz an hordenn genter-kofig .

Neer : test de ~ ◇ **Neer test** ◇ **prouad Neer** Embreg amkanet da lakaat war wel ur gouzañvder endan-germskoaz : gorreadur gouzañvat war raok ar vrec'h, an dorn o vezañ palvstouet, o tevoudañ ul laur dreist 90°.

négatif : faux ~ ◇ ◇ **1 gaounac'hek** aa. **2 gaounac'heg** g. -eion 1 A zo gant ar c'hleñved daoust ma 'z eo nac'hek ar prouad diurnat. 2 Gouziviad gaounac'hek (sl. *positif* : faux ~).

négatif : vrai ~ ◇ ◇ **gwirnac'hek** aa. **2 gwirnac'heg** g. -eion 1 A zo dik evitañ nac'hegezh ar prouad diurnat. 2 Gouziviad gwirnac'hek.

négativisme ◇ **negativism** ◇ **1 nac'hadegezh** b. **2 nac'honi** b. 1 Termen hollek oc'h erdalañ un teskad ersavioù boutin etrezo an herzel ouzh ar gougorzhañ : furmoù herzel gouzañvat pe oberiat, diarvonn pe diarzoug, gougorzhañ diavaez pe diabarzh, kedvuhez pe eriuennel; skouerioù a *herzel gouzañvat* (Gl. *résistance passive*) eo an nac'h erouit an urzhioù roet pe respont d'an atersoù, ar menel anniñvek er plegennoù; ur skouer a *herzel oberiat* (Gl. *résistance active*) ouzh an definañval gouzañvat eo agrezañ ar c'higennoù gourzhaler o vont betek ar fñval a-c'hin; skouerioù a *nac'hadegezh argeladel* (Gl. *négativisme idéomoteur*) eo tec'hout pa vezer galvet, gourvez ouzh an urzh sevel; skouerioù a herzel ouzh ur gougorzhañ diabarzh eo an nac'h debriñ, an azdalc'h troazh — sellet e degouezhioù 'zo hepken evel furmoù nac'hadegezh; lodek e c'hell bezañ an nac'hadegezh e taolenn glinikel al labanded, ar gaouvar hag ar fincherezh, ar mania hag ar velankoliezh ha dreist holl ar gatatoniezh. 2 Perzh neuzidel o c'houstennañ an tued d'an emzalc'hioù nac'hañ (sl. *catatonie*).

négatoscope ◇ **negatoscope** ◇ **negatoskop** g. -où, **gleurer** g. -ioù Ardivink o c'hoarvezout eus ur skramm goulaouiñ arveret da lenn ar skinlunioù dre drezuzwel.

(-)*négat-*

- *anions, ions négatifs* anion, ion leiel • *attitudes négativistes* emzalc'hioù nac'hadek • *bathmotrope négatif* broudiswezher
- *chimiotactisme négatif* kimidrevn nac'hek • *chronotrope négatif* talmiswezher • *délire de négation* ambren a 'n anrevoud
- *dénégation* goumezañ • *électronégatif* tredanleiek • *dromotrope négatif* reniswezher • *eugénie négative* heouennouriezh nac'hek
- *film négatif, négatif* film ginel, ginenn • *forme négative des dents* ginstumm an dent • *géotaxie négative* douardrevn nac'hek
- *Gram-, Gram moins, Gram négatif* Gram-, Gram lei, Gram nac'hek • *hémoculture négative* gwadtiñvañ nac'hek • *idée de négation* mennoz anrevoud • *inotrope négatif* argreziwezher • *la réaction de Paul et Bunnell est négative* nac'hek eo erwezher Paul ha Bunnell • *ions chargés négativement* ion leivec'hiet • *la réaction est négative quand le complément n'a pas été fixé* nac'hek e vez an dazgwered pa n'eo ket bet lenet ar glokaenn • *le test est négatif* nac'hek eo ar prouad • *négativation de l'onde T* lelelaat ar wagenn T • *polarité électrique négative* tredanvleinegezh leiel • *pôle négatif* blein leiel • *retrocontrôle négatif* korwered emleiaat
- *patient séronégatif* gouziviad gwadveiznac'hek.

1 négligence motrice **2 négligence spatiale unilatérale, héminégligence** ◇ **neglect syndrome** ◇ **1 andeur** g. **loc'hadel** **2 ledandeur** g. **egorel** 1 Strafuilh en damant en deus ar gouziviad ouzh un hanterenn eus e gorf, ageñver gant anafoù empenn, en azoniadoù derc'hvel el pluskennel : *ledkorfandenaoud* (Gl. *hémiasomatognosie*, sl. *asomatognosie*), *nammaneroug* (sl. *anosodiaphorie*). 2 E 2005 ez eus bet deskrivet ur furm dibarek a andeur a-geñver gant al ledseizi kleiz, e dalc'h an empenn dehou enta : azoniad an *ledandeur egorel* (Gl. *négligence spatiale unilatérale* pe *héminégligence*) ma chom ar gouziviad dic'houzvez ha diseblant ouzh tu kleiz e gorf hag, ouzhpenn se, ouzh an dud hag an traoù loet en tu kleiz dezhañ (sl. La 18 107-108).

Negro : signe de ~ ◇ **Negro sign** ◇ **arouez** b. **Negro** E seizi an dremm a orin trobarzhel, pa c'houlenner ouzh ar c'hlañvour sellout d'al laez hep fñval e benn, e sav uheloc'h ar voull lagad en tu seizet, anadenn na c'hoarvez ket pa vez kreizel ar seizi.

Neisseria ◇ **Neisseria** ◇ **Neisseria** b. Genad bakteri eus kerentiad an *Neseriaceae* oc'h erdalañ ar spesadoù *N. gonorrhoeae* ha *N. meningitidis* pergen.

Neisseriaceae ◇ **Neisseriaceae** ◇ **Neisseriaceae** Kerentiad kokobazhilli Gram-diloc'h, stallet dre zaouadoù, gougevret outañ ar genadoù *Neisseria*, *Moraxella* (pe *Brahamella*) hag *Acinetobacter*.

neissérien ◇ **neisserial** ◇ **neiserel** aa. A-zave d'ar gonokok (*Neisseria gonorrhoeae*, *gonococcus*), gonokokel.

Nélaton ou **Nélaton-Roser** : ligne de ~ ◇ **Nélaton line** ◇ **linenn Nélaton** Eeunenn a-veskell war draoñ ha war ziabarzh o vont dre ar spermenn glun araok uhelañ, kern an trovaleg bras hag an askorn koazez pa vez hanterbleget an ezel traoñ, linenn dave evit dewerzhañ dilec'hiaour an trovaleg bras en torroù pe en disvelladoù a 'l lez.

Nélaton : manoeuvre de ~ ◇ **Nélaton maneuver** ◇ **kefleuñvad** g. **Nélaton** Araezad amkanet da ziren disvellad war raok ar c'henvell ividig-gaved.

Nélaton : signe de ~ ◇ ◇ **arouez** b. **Nélaton** Arouez un anaf en nervenn a-werzhid diwar un torr eus treuzenn ar paler : ar c'hiziata a draoñ da grec'h ouzh an ilin a zec'han ul laur ha kemenerion o saezhenniñ trema an dorn.

Nélaton : sonde de ~ ◇ **Nélaton catheter** ◇ **kateter** g. **Nélaton** Sont bouk evit kateteriñ ar c'han troazh.

Nelson ou **Nelson-Mayer** : réaction ou test de ~, test d'immobilisation des tréponèmes, TIT ◇ **Nelson test**, **treponema pallidum immobilization test**, **TPI-test** ◇ **prouad g. Nelson**, **prouad diloc'husaat an treponem**, **PDT** Dazgwered gwadveizel spesadel d'ar sifiliz : gwadvez ar gouziviad, ezniñvet ha mesket, a-zivasek klokaenn fresk, gant un arc'hoalenn *Treponema pallidum*, a lam diouto o loc'husted hag o foreüstid ouzh ar c'honikl; en ur feur a 50 % a 'n degouezhioù ez eo yaek ar prouad, a 100 % bepred e-kerz dedro ar c'hleñved; dilezet eo bet ar prouad-mañ e gounid *deznau bevoniel ar sifiliz* (sl. *siphilis : diagnostic biologique de la* ~).

Nelson : syndrome de ~ ◇ **Nelson syndrome** ◇ **azoniad Nelson** Adenom (livlez peurliesañ) a 'r c'hougoufenn o tarvezout goude ezvenadur daoudeuek an uslouezhenn ouzh azoniad Cushing, erzerc'hat dre arouezioù ur yoc'henn endibrel, ur reñver borc'hañ ACTH hag ur melanoderma doues.

Némathelminthes ◇ **Nemathelminths** ◇ **Nemathelminth** s. Preñved eus kevrennad an Helmint (sl. hir ha kranennek, anhanrannek o c'horf, gougevret outi an *Nematod* (askarid, oksuri, ankilostom, strongil, h.a.), an *Nematomorfe* hag an *Akantokefal* (sl. *helminthes*).

Nématodes ◇ **Nematodes** ◇ **Nematod** s. Urzhad preñved naoous dre ur c'horf neudheñvel, en o zouez lies arvevad, evel an *askarid*, ar *filar*, h.a.

néocérébellum, TA **neocerebellum** ◇ **neocerebellum** ◇ **neokerebellom** aa. Parzh nevesañ ent hildarzhel eus an ilpenn; emañ ent neuziadurel a-geñver gant ar rannbarzhioù pluskennpontel hag ent vededourel gant kenurzhiezh ar fiñvoù.

neocytes ◇ **neocytes** ◇ **nodruz** s. Kelligoù ruz yaouank d'an ampoent ma nodont er-maez eus ar mel eskern.

neocytophérese ◇ **neocytopheresis** ◇ **nodruzedrannañ** Treuzskuilhañ gwad arfonnet gant nodruz (hemati yaouank dezho hiroc'h hoali) a-benn gorrekaat talm an treuzskuilhadurioù (sl. *cytaphérese*, *érythra-phérese*, *hémaphérese*).

néodarwinisme ◇ **neodarwinism** ◇ **nevezdarwinouriezh** b. Arlakadenn emdroerezh ar spesadoù loenel ha struzhel, anezhi arlakadenn Darwin daskemmet da heul degasadennoù an Hiloniezh : treuzkas an doareennoù hêrezhel, dargenañ, h.a. (sl. *génétique*, *hérédité*, *mutation*).

néogenèse ◇ **neogenesis** ◇ **nevezparañ** Furmiñ un organ nevez, ur wazhiedenn da skouer.

1 néoglucogénèse, **néoglycogénèse**, **gluconogénèse**, **glyconogénèse** **2 néoglycogénèse**, **néoglycogénogénèse** ◇ **1 néoglucogenesis** **2 neoglycogenesis**, **neoglycogenogenesis** ◇ **1 glukoznevezparañ** **2 glikogennevezparañ** 1 Furmiñ ar glukoz diwar gediadoù anglukidek (amindrenkennoù hag o deveradoù). 2 Furmiñ er bevedeg (en avu dreist holl) glikogen diwar proteinoù ha lipidoù.

NOTENN : Derc'hel kont eus forc'hellegezh termennoù gallek ha saoznek 'zo.

néonatale : période ~ ◇ **neonatal period** ◇ **prantad g. nevezc'hanedel** Deizioù kentañ ar vuhez; da c'houde ez a an nevezc'haned da vagadell betek dibenn an eil bloavezh (sl. *âge* : *premier* ~, *enfance*, *nourrisson*).

néonata/ologie ◇ **neonatology** ◇ **nevezc'hanedouriezh** b. Diskiblezh vezegel o plediñ gant an nevezc'hanidi.

néoplasie, **processus néoplasique** ou **néoplastique** ◇ **neoplasia** ◇ **nevezweañ**, **argerzh g. nevezweat** Furmiñ ur gwiad nevez diwar nerin kelligoù o deus nebeut keñverioù neuziadurel hag arc'hwelel gant ar gwiad a evodont dioutañ.

néoplasme ◇ **neoplasm** ◇ **1 nevezwe g. 2 hanwe g.** 1 Yoc'henn, kuñv pe yud, diwar neridigezh antrevn kelligoù ur gwiad. 2 Nevezwe yud.

NOTENN : Intent a reer an nevezweañ evel ur skouer a *ec'houluniañ*, eleze a bellaat diouzh ar goulun reol, o c'hoarvezout en degouezh hervez daou vod : dre angorzhañ pe ar gwiad hepken hep tizhout ar c'helligoù en ampar (tro voas an nevezweoù kuñv), pe ar c'helligoù o unan (tro an nevezweoù yud pe hanweoù) (sl. La-09 322).

néoplastie ◇ **neoplasty** ◇ **nevezateliñ** Termen hep ster spis, arveret peurliesañ evit arouezioù ur gwezh *surjianerezh ateliñ* (Gl. *chirurgie plastique*) ha *surjianerezh heneuziañ* (Gl. *chirurgie esthétique*); erdalañ a ra enta an *unanimboudañ* (Gl. *autogreffé*), an *unanateliñ* (Gl. *autoplastie*), an *azuc'haat* (Gl. *lifting*) ha kement oberatadenn asparañ, adkempenn pe ratreañ (sl. *blépharoplastie*, *cheiloplas-tie*, *généioplastie*, *otoplastie*, *rhinoplastie*, *staphyloplastie*).

néostigmine ◇ **neostigmine** ◇ **neostigmin g.** Amoniom perbonadel kevanaoz a ziounezer a-drewan ar vromidenn anezhañ (*Prostigmin*[®]) evel tolc'her d'ar c'holinesteraz (kolinwerc'her, dispisveveler) evit parraat ouzh antant goudesurjianel ar c'hwedzigell hag ar pervez, diouzh un tu all evit prederiañ ar viasteniezh c'hrevus.

néostomie ◇ **neostomy** ◇ **nevezforzhañ** Anvad rumm evit ar gwezhioù a c'hoarvez a skarvañ etrezo daou organ kleuz (kanol pe kavenn) (*dasforzhañ*) pe a zigeriñ war an diavaez un organ kleuz (*hezforzhañ*) (sl. *gastroduodénostomie*, *gastrostomie*).

néphélé/ométrie ◇ **nephelometry** ◇ **nefelometriezh** b. Hentenn arveret evit dewerzhañ bec'h ur c'horf en arc'hoal dre vuzuliañ gant ur skalfadluc'hventer (nefelometr) al luc'had amskoget eus ur skin o treuziñ an arc'hoalenn, kalvezder arveret da andalañ bec'h ul livrizhad garvevion pe un dierc'had proteinoù.

néphélon ◇ **corneal cloudiness**, **nebula** ◇ **nivlad g. kornsae** Tienn vihan war ar gornsae, damdreuzwelus, he demerded etre hini an albugo ha hini ar banne.

néphrectomie ◇ **nephrectomy** ◇ **lounezhezvenañ** Lemel an holl pe un darn eus ul lounezh.

néphrétique ◇ **nephritic**, **nephric** ◇ **lounezh**, **lounezhel g.** A-zave d'al lounezh, sk. : *gwentl al lounezh* (sl. *colique néphrétique*).

NOTENN : Ne vez arveret Gl. *néphrétique*, Sz. *nephritic* (eus Gr. *nefritikov*”, ”gant an droug lounezh”) koulz lavaret nemet er c'heriennoù Gl. *colique néphrétique*, Sz. *nephritic colic*; en degouezhioù all e klot Br. *Tounezh*, *lounezhel* gant Gl. *rénal*, Sz. *renal*; notomp e kaver Sz. *renal colic* ivez, hag Al. *Nierenkolik*.

néphrite ◇ **nephritis** ◇ **lounezhfo g.** Tanijern al lounezh (sl. *néphropathie*, *néphrose*).

NOTENN : E galleg, e vez alies arveret *néphrite* evel kenster da *néphropathie*, Br. *lounezhad*, ”anvad rumm kleñvedoù al lounezh”.

néphrite chronique avec perte de potassium ◇ **potassium-losing nephritis** ◇ **lounezhfo henek kaliomadavadel** Seurtad dibaot lestrlounezhfo naouus dre ur skorted lounezh gant reñver ezvevennañ ar c’haliom dre an troazh, fuad o tec’han ur gwadusvec’h kaliom hag alkaloz kennevidel, erzerc’haet gant glazoù, asiktet kaherel garv peluzus a-wechoù, tuadur d’ar c’hoempad.

néphrite hématurique ◇ **haemorrhagic nephritis** ◇ **lounezhfo gwadliñvel** Seurtad bloueigfo henek kevret gant troazhwad-egzh trabedek hag adfeilhus.

néphrite interstitielle, néphropathie interstitielle ◇ **interstitial nephritis** ◇ **lounezhad b. entremezel** Lounezhad ma vez an anafoù o sezañ en esaou etre ar pibelloù hag etre ar remañ hag ar bloueigoù; poreel peurliesañ (ul lestrlounezhfo eo neuze) pe pistriel (diwar fenaketin, enepfoeier ansteroidel, bevastalerioù ’zo); dibaotoc’h, e teu da rouestlañ ur steviadur a ’r forzhioù degorzhañ hep poreadur, an diabet, an urloù, ar gwadusvec’h kalkiom, h.a.; naouus hepken e-pad pell dre vezañs proteinoù ha leukokit niverus en troazh, e tedro gorrek etrezek ar skorted lounezh gant gwadusvec’h urea, a-wechoù akidoz gant kolesterolwadusvec’h hag uswask talmerel; da notañ degouezhioù eus ul l. e. henek a-gentizh, pe *lounezhad entremezel naouezennus Bell* (Gl. *néphrite interstitielle exsudative de Bell*).

néphroanémiques ou hémolytiques et urémiques : syndromes ~ ◇ **haemolytic uraemic syndromes** ◇ **azoniadoù gwadloezadel ureüsvec’hel** Kevreted an amwad loezadel muiek, ul lounezhad lemm gant troazhvec’h gwad ha proteinoù, gwadusvec’h urea hag, a-wechoù, olpladanoù gant pe hep purpura; e-kichen furn guradus ar vagadell e revez furnoù grevus ar bugel hag an oadour o tedreñ herrek etrezek ar marv dre skorted lounezh ha, gant an oadour, dre uswask talmerel; *ent neuziadurel* e stader anafoù a lavwazhiedanaez trombozus, a-wechoù a varvennad pluskenn al lounezh; renkañ a reer an a. g. u. e stern an amwadoù loezadel ha lavwazhiedanaezel (sl. *microangiopathie*).

néphroangiosclérose ◇ **nephroangiosclerosis** ◇ **nefroangioskleroz** g. Anafoù e talmerennigoù al lounezh o tarvezout hogos bepred e-kerz an usvec’h talmerel lavaret kentael : anezho hialinaat ensae talmerenn degasat ar bloueig, oc’h emastenn da gorrwazhied ar bloueig e unan; en n. *kuñv*, e vez goulerc’hat an erzerc’hadoù klinikel; en n. *yud* e stader anafoù ledekoc’h ha grevusoc’h : tizhadoù entalmerennfo kenkizus strewek, marvennus ha trombozus; heskwadec, sklerozek a-wechoù, e vez ar bloueigoù; war hollekaat d’ar bevedeg a-bezh ez a tizhadur an talmerennigoù; herrek ha grevus e vez an dedro, hini an uswask talmerel yud, etrezek ar skorted lounezh (sl. *artériolite nécrasante, artériolosclérose, hypertension artérielle maligne, néphroanémiques [...]* : *syndromes* ~).

néphrocalcinoze ◇ **nephrocalcinosis** ◇ **nefrokalkinoz** g. Koc’hionadur halioù kalkiom e-barzh parenkim al lounezh, e dianlen an arskoedusvorc’h, an akidoz klorwadusvec’hel hennadec, poreadoù al lounezh (sl. *calcinoze*).

néphrocarcinome, épithélioma du rein à cellules claires ◇ **renal cell carcinoma, renal adenocarcinoma** ◇ **nefrokarkinom g., epiteliom g. al lounezh kelligoù sklaer** Yoc’henn yud evodet diouzh kelligoù ar pibelloù; “hipernefrom” e raed anezhi da gentañ pa arlakaed dezhi un orin uslounezhel (sl. *hypernéphrome*).

néphroépithéliome ◇ **adenocarcinoma of renal tubules** ◇ **nefroepiteliom g.** Epiteliom kentael a ’l lounezh evodet diouzh kelligoù an epitelienn eus tuellennoù al lounezh.

néphrogénique, néphrogène ◇ **nephrogenous** ◇ **lounezhien** aa. A orin lounezhel.

néphrogramme ◇ **nephrogram** ◇ **lounezhlunad g.** Skeudenn dewerc’het dre al lounezhluniñ.

néphrogramme isotopique, rénogramme isotopique, radiorénogramme ◇ **radioisotope renogram** ◇ **lounezhtresenn b. izotopek** Kevregad oc’h erzerc’haat, a-gevreizh d’ar pad, ezvevennerezh lounezhel un danvezenn (hipuran) tiellet gant ar skiniod ensinklet dre ar wazhienn; diwar-bouez ur sont skingannluniñ arloet en daou du ouzh an dargreiz e vez lerc’hwezet ar skinoberiegezh ardreuzat dec’hanet el lounezhi; dre ar c’hevregad dewerc’het e c’haller barn talvoudegezh arc’hwele pep hini eus an div lounezh.

néphrographie ◇ **nephrography** ◇ **1 lounezhluniñ 2 lounezhlunad g. 3 lounezhtresennañ izotopek 4 lounezhtresenn izotopek** 1 Skinluniñ parenkim al lounezh dewerc’het e-kerz un troazhluniñ pe, e-kerz un talmerennluniñ lounezh, pa stag an Xdmerenn da intrañ forzhioù degorzhañ kentañ al lounezh. 2 sl. *néphrogramme*. 3 Lerc’hwezañ ul lounezhtresenn izotopek. 4 sl. *néphrogramme isotopique*.

NOTENN : E galleg ez arverer alies *néphrographie* e-lec’h *néphrogramme*; en eneb, evit lod eus an aozerion ez eo ankewer ar sterioù 2 ha 4.

néphrolithe ◇ **nephrolithe** ◇ **lounezhvaen g. (l. : lounezhvein)** Grouanenn al lounezh.

néphrolithiase ◇ **nephrolithiasis** ◇ **grouanegezh b. al lounezh** Bezañs grouan e kavennoù al lounezh.

néphrologie ◇ **nephrology** ◇ **Lounezhouriezh b.** Arbennigiezh vezegel war gleñvedoù al lounezh (sl. *urologie*).

néphrolyse ◇ **nephrolysis** ◇ **lounezhezgleñañ** Dizalc’hediñ surjanel al lounezh, al lestr, parzh uhelañ ar san droazh hag an droadenn e sell da erlemel an organ ha d’e drezplantañ.

néphrome ◇ **nephroma** ◇ **nefrom g.** Anvad rumm yoc’hennoù al lounezh.

néphron ◇ **nephron** ◇ **nefronenn u. (s. : nefron)** Unvez neuziadurel hag arc’hwelel al lounezh, anezhi ur bloueig, un duellenn droazh (Gl. *tube urinfère* pe *tubule*), ouzh he ober ar bibell nezek (Gl. *tube contourné proximal*), kizenn Henle (Gl. *anse de Henle*), ar bibell bellek (Gl. *tube contourné distal*) o tifourkañ er ganol dastum (Gl. *canal collecteur*).

néphronoptise héréditaire de l'enfant ou de Fanconi ◇ **familial juvenile nephronophthisis** ◇ **nefronoftiz g. hêrezhel ar bugel** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, naouus *ent neuziadurel* dre un isteñv a 'l lounezh gant tizhad strewek ar pibelloù hag ar gwiad entremezel, alies gant kistoù er vezonenn, *oc'h erzerc'hañ* adalek an oad a 2 pe 3 bloaz dre un eldroazh gant goursec'hed, isdevec'hiañ a 'n troazh, troazhisvec'h amoniak, amwad ha barradoù glizi, o tedreñ en un nebeut bloavezhioù d'ar marv dre skorted al lounezh (sl. *néphropathie tubulo-laire chronique, Senior-Loken* : *syndrome de ~*).

néphropathie ◇ **renal disease, nephropathy** ◇ **lounezhad b.** Anvad rumm anaezioù al lounezh, o verkañ dreist holl an tizhadoù strewek evel al lounezhfoioù kentoc'h eget an anafoù lec'hiek evel an dorzhellegezh; hervez an elfennoù tizhet e tiforc'her ar *blouegadoù* (Gl. *glomérulopathies*), ar *pibelladoù* (Gl. *tubulopathies*), al *l. entremezel* (Gl. *n. interstitielles*) hag al *l. gwazhi-edel* (Gl. *n. vasculaires*) (sl. *néphrite*).

néphropathie diabétique ◇ **diabetic nephropathy** ◇ **lounezhad diabetien** Tizhad al lounezh o tont da rouestlañ an diabet c'hwec, anezhañ ur skleroz a 'r blouegoù o tedreñ gorrek, naouus dre un droazhlavalbuminegezh hag, etre 7 ha 15 vloaz goude, dre daolenn glinikel ul lounezhad henek gant troazhveuralbuminegezh, erfin goude 25 pe 30 vloaz, stad ar skorted lounezh kevret pe get gant an uswask talmerel (sl. *diabète sucré, microangiopathie, microalbuminémie*).

néphropathie épidémique ◇ **nephropathia epidemica** ◇ **lounezhad darreuziadek** Kleñved naouus, goude un deroù gripvanek, dre erzerc'hadoù koazhadel ha troazhadel (gwentl al lounezh, troazhproteinegezh, troazhisvorc'h, troazhwadegezh), o tedreñ an aliesañ, a-benn ur sizhun, d'ar pare; kiriek e ve dezhañ ar viruz *Puumala* treuzkaset gant ar c'hrigner.

néphropathie familiale avec surdité, syndrome d'Alport ◇ **hereditary haematuria associated with nerve deafness and ocular change, Alport syndrome** ◇ **azoniad Alport, lounezhad hêrezhel gant bouzarded** Lounezhad familhel, anezhi kentañ : 1) ul *lounezhfo* henek entremezel gant skleroz ar blouegoù ha lestrlounezhfo henek, oc'h erzerc'hañ alies adal bloavezhioù kentañ ar vuhez dre un droazhproteinegezh, un droazh-wadegezh adfeilhus hag o tedreñ peurliesañ etrezek ur skorted lounezh andizhus; 2) ur *vouzarded* argammedek oc'h anadiñ a-c'houlerc'h; 3) *kammneuziadoù an daoulagad* (ferennlug, sferofakiezh, lentikon); azoniad hêrezhel kemplezh, treuzkaset e ve al lounezhad er mod aotozomek trec'hek Xereet, hag ar *vouzarded*, anarstal, er mod enkilek.

néphropathie osmotique, néphrose osmotique ◇ **osmotic nephrosis** ◇ **lounezhad usgrennel** Darallad al lounezh da heul trefennadoù dileizhennoù usgrennek sakaroz, glukoz, mannitol, dekstran 40, aozadoù dargemm evit an troazhluniñ, graet da c'houziviaded an diabet, ar poreadoù troazhadel, ar falladurioù avu pe lounezh; naouus *ent neuziadurel* dre goëñvadur kelligoù ar pibelloù nezek, *ent klinikel* dre skorted lemm al lounezh gant troazhhesk a-wechoù marvus.

néphropathie posttransfusionnelle ◇ **transfusion nephritis** ◇ **lounezhad diandreuzkuilh** Skorted lounezh grevus, troazhheskel ha gwadureel da heul ar gwadrep hag ar gwadloezañ dianlenat d'un dreuzkuilhadenenn gwad digempadus.

néphropathie tubulaire chronique ◇ **chronic tubular nephritis** ◇ **lounezhad pibelle henek** Anaez naouus dre zaralladur un pe lies arc'hwel eus ar pibelloù, gwech lodek en ur skorted lounezh bloc'hel, gwech digenvez hag o vezañ neuze pe ganedigel kentañ, pe eilvedel da gleñvedoù hêrezhel ar c'hennevid (kistinoz, glikogenoz, kleñved Wilson, h.a.), pe c'hoazh da bistradurioù.

néphropathie tubulo-interstielle aiguë, néphrose aiguë ◇ **acute tubulointerstitial nephritis** ◇ **lounezhad pibellentremezel** Stroll nozologek anaezioù a arbennoù liesseurt, naouustret spis avat *ent klinikel*, dre un damantroazh grevus gant azdalc'h urea hep gouliñv, *ent neuziadurel* dre anafoù lounezh, eiltroüs peurliesañ, gwech war ar pibelloù nezek, gwech war ar pibelloù pellek.

néphropexie, néphrorraphie ◇ **nephropexy** ◇ **lounezhAanlenañ** Festañ surjanel ul lounezh heloc'h.

néphroptose ◇ **nephroptosis** ◇ **islink g. lounezh, lounezhislink g.** Heloc'hded ha dilec'hiadur ezreol al lounezh dre benn laosket an araezioù festañ anezhi; daou zerez a ziforc'her : en hini kentañ emañ al lounezh *iskantet*, eleze diskennet hepken, en eil derez e lavarer ez eo *eskantet*, eleze loet e forzh pe boent eus kavenn ar c'hof.

néphrorragie ◇ **nephrorragia** ◇ **gwadliñv g. lounezh, lounezhwadliñv** Gwadliñv o tont eus al lounezh.

néphrorraphie ◇ **nephrorraphy** ◇ **1 lounezhAanlenañ 2 dlita lounezh, lounezhdlita** 1 sl. *néphropexie*. 2 Krafaelañ ul lounezh bet flañchet (sl. *néphrotomie*).

néphrosclérose ◇ **nephrosclerosis** ◇ **nefroskleroz g.** Skleroz al lounezh.

néphrosclérotique ◇ **nephrosclerotic** ◇ **1 nefrosklerozek aa. 2 nefrosklerozel aa.** 1 Gant skleroz al lounezh. 2 A-zave da skleroz al lounezh.

néphrose ◇ **nephrosis** ◇ **nefroz g.** Termen kinniget e 1905 evit arouezañ anafoù dic'henezhadel al lounezh hep tanijenn, a-gevenep da lounezhfo enta; da c'houde e voe arveret da sevel ar c'herienn *nefroz lipoidel* (sl. *néphrose lipoidique*); hiziv en en kaver hepken evel kenster da *azoniad nefroz* (sl. *néphrotique* : *syndrome ~*).

néphrose lipoidique ◇ **lipoid nephrosis** ◇ **nefroz lipoidel** Anvad lakaet e 1917 gant Epstein war ur c'hleñved naouus dre vezañ un ensilenn druz e kelligoù ar pibelloù hag un azoniad nefroz pur (*kleñved Epstein*); hiziv e reer eus hevelep anaez ur seurtad a 'r blouegfo henek gant anafoù leiek.

néphrosplénographie ◇ **nephrography with splenography** ◇ **skinluniñ felc'h ha lounezh** ◇ **lounezhfelc'h'luniñ** Skinluniñ ar felc'h hag al lounezh goude ensinklañ un Xdemerenn er gwad.

néphrostomie ◇ **nephrostomy** ◇ **lounezhhezforzhañ** Dewerc'hañ surjanel ur fic'h etre kavenn al lestroù hag ar c'hroc'hen evit gwehenniñ pe amdreugañ an troazh.

néphrotique : **syndrome** ~ ◇ **nephrotic syndrome** ◇ **azoniad nefroz** Azoniad naous dre ur gouliñv hollek, un droazh-proteinegezh puilh, ur protidwadusvec'h e gounid an albumin (gant ginadur ar c'heñver albumin-globulin) hag alies ul lipid-wadusvec'h (ar β -lipoprotein dreist holl); pur, an *a. n.* ne endalc'h na troazhwadegzh, nag azdalc'h urea, nag usvec'h talmerel; kevredet, e talvez dezhañ anañ gant anafoù bloueigell muiek; stadet e vez e-kerz kalz anaeziou : bloueigfoioù henek (sl. **néphrose lipoïde**), kleñved amiloïdel (sl. **amyloïdose**), lupuz eritematus lemm strewek (sl. **lupus érythémateux aigu disséminé**), lestrloun-ezhfo henek (sl. **pyélo-néphrite chronique**), diabet, strafuilhoù an amred diwar ur pstriadur pe ar vrazedded a-wechoù; deskrivet ez eus bet furmoù familhel ar vabaned.

néphrotome ◇ **nefrotom** g. Eginenn vezodermel hanannel a 'n nefronenn (sl. **métamérie**).

néphrotomie ◇ **nephrotomy** ◇ **lounezhenbenañ** Flañchadenn graet el lounezh, war-benn amzivenañ ur c'hrouanenn pe karzhañ un hogennad liñvenn.

néphrotoxicité ◇ **nephrotoxicity** ◇ **lounezhpistriusted** b. Noazusted ouzh kelligoù al lounezh.

nerf, PNA **nervus** ◇ **nerve** ◇ **nervenn** b. Funell granennek azgwenn ouzh he ober hordenn an aksonoù o vont eus ur greizenn nerval d'un organ; diforc'hiñ a reer, diouzh un tu hervez o lec'hiadur, an *n. a-glopenn* (sl. **nerfs crâniens**) notet eus ar mel penn (sl. **encéphale**) hag an *n. a-livenn* (Gl. **nerfs rachidiens** pe **spinaux**) notet eus an hirvel hag ar mel a-livenn, diouzh an tu all, hervez o arc'hwel, an *n. santout* (Gl. **n. sensitifs**), an *n. loc'hañ* (Gl. **nerfs moteurs**), *n. ar c'hemoned* (Gl. **n. de la vie de relation**), *n. ar struzhelezh* (Gl. **n. de la vie végétative**).

nerf sus-scapulaire : **syndrome du** ~ ◇ ◇ **azoniad an nervenn us-skoaz** Azoniad dibaot, diwar amwask an nervenn us-skoaz en ask ar planken, naous dre laurioù e rannbarzh ar skoaz, muiaet pa deutaer lec'hienn ar beg bran ha pa nesaer a-helc'h ar vrec'h, hag un isteñv goulerc'hat eus ar c'higennoù us- hag is-spernenn.

nerf trijumeau, TA **nervus trigeminus** ◇ **trigeminal nerve** ◇ **nervenn drigevell** Pempet daoudañv nervennoù a-glopenn o kavaziñ e par ar gangrenn gornloarek etre tri barr : *nervenn al lagad* (TA **nervus ophthalmicus**), *nervenn ar garvan* (TA **nervus maxillaris**), *nervenn ar c'haved* (TA **nervus mandibularis**); an *n. t.* zo nervenn santout evit an dremm, nervenn loc'hañ evit ar c'higennoù chageller.

nerfs crâniens ◇ **cranial nerves** ◇ **nervennoù a-glopenn** Nervennoù o nodiñ eus ar mel penn (sl. **encéphale**) e ser daoudañvoù kemparzhik ha kavlec'hiet dre sifrennoù roman : I *n. ar c'hvesha* (TA **nervi olfactorii**), II *n. ar gweled* (TA **n. opticus**), III *n. lagadloc'hañ* (TA **n. oculomotorius**), IV *n. a-boleenn* (TA **n. trochlearis**), V *n. drigevell* (TA **n. trigeminus**), VI *n. bellaat* (TA **n. abducens**), VII *n. an dremm* (TA **n. facialis**), VIIbis *n. etreat* (TA **n. intermedius**), VIII *n. rakkamb-melc'houedenn* (TA **n. vestibulocochlearis**), IX *n. deod-gargadenn* (TA **n. glossopharyngeus**), X *n. dispis* (TA **n. vagus**), XI *adnervenn* (TA **nervus accessorius**), XII *n. c'houdeodel* (TA **n. hypoglossus**).

NOTENN : A-raok degemer an destladur etrevroadel PNA embannet e 1956 e voazie an aozerion c'hallek anvadoù all evit nervennoù a-glopenn 'zo : III *n. moteur oculaire commun*, IV *n. pathétique*, VI *n. moteur oculaire externe*, VIIbis *n. intermédiaire de Wrisberg*, VIII *n. acoustique*, X *n. pneumogastrique*, XI *n. spinal*, XII *n. grand hypoglosse*. An destladur talvoudek hiziv, an *Termina Anatomica* (TA), bet gourbonnet e 1997, ne zegas kemm ebet en anvadoù PNA an nervennoù a-glopenn. En daou embannadur eus *Geriadur ar Gorfadurezh* (Preder 1960 ha 1999), mard edo diazezet an anvadoù brezhonek war an destladur PNA, e kaved a-dal dezho an termenou gallek a-gent pa chome neuze ar re-mañ en arver gant an darn vuiañ eus ar vezeion.

nerfs vasosensibles : **syndrome des** ~ ◇ ◇ **azoniad an nervennoù gwazhiederwezhidik** Gorrekaat an tead kalon ha kouezh ar gwask talmerel e dianlen hegadur damougalfoù god ar garotidenn ha god an aortenn (sl. **sinuortique** : **syndrome** ~, **sinuocarotidien** : **syndrome** ~, **vasovagal** : **syndrome** ~).

nesidioblastose ◇ **nesidioblastosis** ◇ **nezidioblastoz** g. Bezañs enezigoù yoc'hennek en ilgreiz (sl. **insulinome**).

Neuhauser : **anomalie de** ~ ◇ **Neuhauser ligamentum arteriosum** ◇ **stagell dalmerel Neuhauser** Kammziorre ar gwaregoù aortek, naous dre un treug drek-treizher eus ar stagell dalmerel, ezreolder e devoud amwask ar vrian hag an treizher.

neurapraxie ◇ **neurapraxia** ◇ **nervennamorzhañ**, **amorzhañ (nervenn)** Span padennek eus arc'hwelioù un nervenn bet kreuet met manet dic'hloaz an aksonoù enni, anaez o parañ ent emdarzh a-benn miz pe zaou.

neurasthénie ◇ **neurasthenia** ◇ **neurasteniezh** b. Termen degaset e 1880 gant ar mezeg amerikan George Beard evit aroueziñ un daolenn glinikel ma soure "an asikted korf a orin nerval"; aet e kerz aozerion all war lerc'h (Freud en o zouez), gwisket warnañ talvoudegezhioù dispis ouzh dispis betek repuñ er yezh voutin e-kichen termenou all evel *limfategezh*, *psikasteniezh*, h.a. (sl. **lymphatisme**, **psychasthénie**).

neurinome ◇ **neurinoma** ◇ **neurinom** g. Yoc'henn a 'n nervennoù trobarzh evodet diouzh kelligoù feur Schwann; kuñv hogos bepred, sezet war ar c'hefioù nerval bras; pa vez lec'hiet war an nervennoù a-glopenn pe ar gwrizennoù a-livenn e tec'han darvoudoù amwask an nerveg kreiz; ur furm yud eo *neurinom Garré* (Gl. **neurinome de Garré**, Sz. **glandular malignant Schwannoma**), dibaot, grevus kenan.

neuro-œdémateux : **syndrome** ~ ◇ **neuroedematous syndrome** ◇ **azoniad nervgouliñvel** Anaez ar vabaned, naous dre ur fric'hargadennfo heuliet gant ur gouliñv muiek ha seizioù gwak, argreskus, a-vloc'h, hep steuz an damougoù a-stirenn, o tizhout gouriz an ezel traoñ, ar c'hef, ar c'hilpenn; o trediñ herrek gwech d'ar peurbare, gwech d'ar marv dre wazhadur kreizennoù an analañ; kiriek e ve ur viruz nergerc'h dianav.

- neuroanémique** : **syndrome** ~ ◇ **neuroanaemic syndrome** ◇ **azoniad nervamwadel** Kevreted azonoù amwad Biermer ha strafuilhoù nerval : kammeraezioù, daralladoù an eraezñ endonfraouadel o vont a-wechoù betek ur gaoudabez (sl. *fibres longues* : *syndrome des* ~) pe a-ser gant un treuzseizi (sl. *scléroses combinées*), dibaotoc'h gant darvoudoù hirvelel, seizi an nervennoù a-glopenn, liesnervennfo.
- neurobiologie** ◇ **neurobiology** ◇ **nervvevoniezh** b. Rann a'r Vevoniezh o plediñ gant ar reizhiad nerval; gant an *Nervvevoniezh volekulel* ez imbourc'her luniadoù molekulel ar gwiaed nerval.
- neuroblaste, neuroectoderme** ◇ **neuroblast, neuroectoderm** ◇ **neuroblast** g., **neuroektoderm** g. Rann a'n ektoderm a ziforc'heky e gwiaed nerval (sl. *ectoderme*).
- neuroblastes** ◇ **neuroblasts** ◇ **neuroblast** s. Kelligoù rizhellel diaraoger an neuron.
- neuroblastome** ◇ **neuroblastoma** ◇ **neuroblastom** g. Yoc'henn yud evodet diouzh ar c'hef simpatek pe ar vezonuslounezhenn, amparet gant elfennoù leteñvel ouzh re eginennoù rizhellel ar simpateg, lies seurtad anezhi : 1) ar *simpatom simpatogonek* pe *simpatogoniom*, diwar neridigezh ar c'helligoù peurandiforc'haet; 2) ar *simpatom simpatoblastek* pe *simpatoblastom*, kelligoù emdroetoc'h ouzh e ober; 3) ar *ganglioneuro-blastom* pe *simpatikogonioblastom*, a rizh etreat, degouezhet lod eus e elfennoù e penn o azvedigezh (sl. *Hutchinson* : *tumeur de* ~, *Pepper* : *syndrome de* ~).
- neurochimie** ◇ **neurochemistry** ◇ **nervgimiezh** b. Studi an dazgweredoù kimiek a c'hoarvez er reizhiad nerval.
- neurochirurgie** ◇ **neurosurgery** ◇ **nervsurjianerezh** g. Surjianerezh ar reizhiad nerval.
- neurocrâne, TA neurocranium, boîte crânienne** ◇ **neurocranium, braincase, brainpan** ◇ **melglog** b. Parzh krec'h ar c'hlopenn, klozenn askorn dezhi ur gouc'hell, ar *bolzpenn* (TA *calvaria*) hag ul leur, *diaz ar c'hlopenn* (TA *basicranium*), enni ar *mel penn* (TA *encephalon*), en dro dezhi ar pilhon, outi al lodenn nezek eus he gwazhied hag eus an nervennoù a-glopenn (sl. *splanchnocrâne*).
- neurocristopathie** ◇ **neurocristopathia** ◇ **nervgribennad** b. Anvad genadel ar c'hleñvedoù yoc'hennel diwanet diwar un emdreñ ezreol eus ar gribenn arc'hnerveg, rumm o klotañ dre vras gant ar seurtad yoc'hennoù arc'hwelel anvet apudomou.
- neuroendocrinologie** ◇ **neuroendocrinology** ◇ **nervnborc'honiezh** b. Studi ar c'heñverioù arc'hwelel etre ar reizhiadoù nerval hag enborc'hadel (sl. *neurohormone, neurosécrétion*).
- neuroépithéliome, médulloépithéliome** ◇ **neuroepithelioma** ◇ **neuroepiteliom** g. Seurtad dibaot gliom a neuz epitelel hag a zedro yud kenan, o sezañ e par al luc'hsae ha, ral a wech, an empenn; evodiñ a ra a-wechoù diwar aspadennoù melel er rannbarzh kroazell-belost.
- neuroépithélium** ◇ **neuroepithelium** ◇ **neuroepitelienn** b. Epitelienn o perzhiañ en eraezñ skiantennel (milendall, luc'hsae).
- neurofibrome** ◇ **neurofibroma** ◇ **neurofibrom** g. Yoc'henn an nervennoù trobarzh diwar neridigezh kelligoù kenglenel an amnervenn (sl. *Recklinghausen* : *maladie pe neurofibromatose de* ~).
- neurogénique, neurogène** ◇ **neurogenic** ◇ **nervien** aa. Er Vevdouriezh, a orin nerval, sk. : *arlakadenn nervien emgrefren ar galon*; er Gleñvedouriezh, dianlenat d'un tizhad eus ar motoneuron trobarzh.
- neurogériatrie** ◇ **neurogeriatrics** ◇ **nervhenadouriezh** b. Rann a'n Nervouriezh o plediñ gant kleñvedoù an henaded.
- neurogliomatose** ◇ **neurogliomatosis** ◇ **neurogliomatoz** g. 1 sl. *Recklinghausen* : *maladie pe neurofibromatose de* ~. 2 *N. kreizel Cestan* (Gl. *n. centrale de Cestan*), nevezve ar reizhiad neurogliel en he fezh, naouus dre gervezañs kleñved Recklinghausen, meningiomoù, gliomoù a'n nervennoù trobarzh hag a'r c'hreizennoù nerval.
- neurogliome** ◇ **neuroglioma** ◇ **neurogliom** g. 1 sl. *ganglioneurome*. 2 Yoc'henn vihan furmet e par anaf un nervenn diwar goustelladur an nervwiennoù. 3 *Azoniad an n.* (Gl. *syndrome du n.*), teskad ar strafuilhoù gwazhiedloc'hadel, teñvel hag al laurioù devoudet gant broudadur an neurogliom furmet e dibenn kreizel un nervenn bet skejet.
- neurohématiques** : **syndromes** ~ ◇ **neurohaematic syndromes** ◇ **azoniadoù nervwadel** Teskad an erzerc'hadoù kleñvedel kevret ganto strafuilhoù nerval ha gwadel : azoniadoù nervwadloezadel ha nervamwadel pergen.
- neurohémo­lytiques** : **syndromes** ~ ◇ **neurohaemolitic syndromes** ◇ **azoniadoù nervwadloezadel** Kevreted ar c'hleñved gwadloezadel (ha gwadnaouedoù familhel all evel an amwad hemati kornek) hag azoniadoù nerval diseurt (dic'henezhadur livenn-llpenn a-hêrezh, mieloz stiradel dreist holl) (sl. *anémie à hématies falci-formes, hérédodégénérescence spinocérébelleuse, scléroses combinées*).
- neurohormone** ◇ **neurohormone** ◇ **nervhormon** g. Danvezenn broteek (peptid) borc'het gant elfennoù 'zo eus an nerveg, en araez da werediñ a-nes pe a-bell, sk. : an hanteradoù kimiek (sl. *médiateur chimique*), an elloerennoù hag an heuderennoù paret gant ar gouzerc'hvel hag o werediñ war ar c'hougorfenn (sl. *facteur inhibant [...], facteurs de déclenchement, médiateur chimique*).
- neurolepride** ◇ **neuroleprid** ◇ **neuroleprid** Strafuilh teñvel e rezh un dispuilhad devoudet gant un nervennfo diwar bazhell Hensen.
- neuroleptanal­gésie** ◇ **neuroleptanalgesia** ◇ **nervisrezic'hostañ** Lemel pe distav an eraezñ laurel dewerc'het dre araez an nervisreerioù.
- neuroleptique** ◇ **neuroleptic** ◇ **1** **nervisreüs** aa., **neuroleptek** aa. **2** **nervisreer** g. -ioù, **neurolepteg** g. -eier 1 O c'hevennañ ar vroudedgezh nervgaherel. 2 Rumm liaoù arveret er vredevezekiezh abaoe 1950 evit prederiañ an erzerc'hadoù

bredanaezel (usniñv, ambrenoù, trezerc'hioù); dedreñ a reas ar rummadur anezho bep ma tizloed nervisreerioù nevez : graet e voe un dasparzh kentañ etre *n. hezus* (Gl. *n. sédatifs*), direüs d'ar c'hefrou ha d'an argadusted, ha *n. askus* (Gl. *n. incisifs*) pe *eneppsikozek* diounezet ouzh ar psikozioù lemm pe henek; an donedigezh e 1970 eus nervisreerioù lavaret a *eil remziad* a roas tro d'ur rannadur nevez etre *n. klasel pe rizhek* ha *n. anrizhek* ergemennet evit ar furmoù psikoz (skizofreniezh pergen) diefedus outo an *n. a gentañ remziad*; ent vevoniel e wered an *n.* war an treuzkas sinapsel, an *n. klasel* o tolc'hañ buzerioù an dopamin, an *n. anrizhek* o werediñ war buzerioù ar serotonin; ent klinikel, ouzhpenn o gwerc'husted ouzh ar bredanaezioù (o renkañ a reer dindan an anvad rumm *bredwezher*, Gl. *psychotrope*) o devez an *n.* gweredoù hezonius (Gl. *ataractique*), huneiat, eneppez, enepc'hwelus, enebnkrez; ar miweredoù pennañ ganto eo ar bredistead, ar barkinsonegezh hag ar mifiñvoù ampellat; da notañ ivez an darvoud grevus ez eo *azoniad yud an nervisreerioù* (sl. *ataraxie, bradypsychie, dyskinésie tardive, (-)leptique, neuroleptiques : syndrome malin des ~, parkinsonisme, psychotrope*).

neuroleptiques : syndrome malin des ~ ◇ **neuroleptic malignant syndrome** ◇ **azoniad yud an nervisreerioù** Kevreted uswrez, anfiñv, migenskiant, c'hwezennoù puilhek, halvusvorc'h, ustead-migorvez, arouezioù bevoniel rabdomioliz a stader war c'houziviaded prederiet gant nervisreerioù; en 25 % eus an degouezhioù ez eo gweudek an erbedad; gwellaet eo bet gant un darlaosker, an *dantrolen*; azoniad a hañval bezañ nes e wikefre da hini an *taol gwrez* ha da hini *uswrez yud an dieraziñ* (sl. *coup de chaleur, hyperthermie maligne per-anesthésique*).

neurologie ◇ **neurology** ◇ **1 Nervoniezh b. 2 Nervouriezh b.** 1 Imbourc'h skiantel war an nerved, he neuziadurezh, he bevedelezh, he c'hleñvedoù. 2 Rann eus ar Vezekniezh o plediñ gant anaezioù an nerved.

neurologue ◇ **neurologist** ◇ **nervour g. -ion** Mezeg arbennikaet war anaezioù ar reizhiad nerved.

neurolophome ◇ **neurolophoma** ◇ **neurolofom g.** Anvad genadel yoc'hennou an nerved evodet diouzh ar gribenn arc'hnerveg : ganglioneuromoù, neuroblastomou, melanomou, neurinomou, apudomou (sl. *neurocristopathie*).

neurolyse ◇ **neurolysis** ◇ **1 nervennezgleñañ 2 nervennloezañ** 1 Dizalc'hediñ surjaniel un nervenn amwasket gant ur gleizenn pe ur c'heloid ebarzh- pe emaez-nervenn. 2 Distrujañ un nervenn dre araez ensinkladurioù alkoool graet e-barzh an nervenn he unan.

neurolytique ◇ **neurolytic** ◇ **1 nervennloezus aa. 2 nervennloezadel aa.** 1 O tevoudañ an nervennloezañ. 2 A-zave d'an nervennloezañ.

neurome ◇ **neuroma** ◇ **neurom g.** Yoc'henn amparet diwar ar c'helligoù nerved o unan (sl. *ganglioneurome, neurinome, neurofibrome*).

neuromère ◇ **neuromere** ◇ **neuromer g.** Hanrann eus an arc'hnerveg (sl. *tube neural*).

neuromodulateur ◇ **neuromodulator** ◇ **nervc'houluzer g.** Danvezenn nes d'an nervdreuzkaserioù (sl. *médiateur chimique*), o werediñ avat e par ar sinaps en un doare strewekoc'h en egor hag en amzer.

neuromyélite optique aiguë, neuropticomyléite aiguë, maladie de Devic ◇ **neurooptic myelitis** ◇ **melnervennfo g. gweladel lemm, kleñved Devic** Kevreted ul livennvelfo strewek, lemm peurvuiañ hag, o tedreñ war lerc'h, en ur ser pe a-raok un nervennfo gweladel, laurus hogos bep tro, erzerc'h ent klinikel dre un treuzseizi hag un dallentez; anaez marvus a-wechoù, peurliesañ oc'h argizañ gorrek, sellet gant aozerion 'zo evel ur furn lemm a skleroz strewek.

neuromyopathie ◇ **neuromyopathy** ◇ **nervkaherfo g.** Anaez o kevrediñ tizhadou an nerved hag ar c'higennoù.

neuronavigation ◇ **neuronavigation** ◇ **nervdeññ** Kalvezder spislec'hiañ un anaf empenn e-kerz ur gwezh nervsurjianerezh, dewerc'hed dre araez a skeudennerezh (skinerluniñ, dason gwarellel) ragoberata.

neurones ◇ **neurones** ◇ **neuron s.** Kelligoù nerved, pep hini o c'hoarvezout eus ur graoñell e kreiz un dolzenn brotoplasm (*perikarion*, Gl. *péricaryone*), diouti ur bleñchennadur *dendrit*, (Gl. *dendrites*) a reer an *dendron* (Gl. *dendrone*) eus an teskad anezho, hag un astennad hir, kranennek, an *akson* pe *kilindraks* (Gl. *axone, cylindraxe*) (sl. *axollemme, axone, myéline, nerf, synapse*).

neuronique ◇ **neuronic** ◇ **neuronel aa.** A-zave d'an neuron; *diskarg neuronel* a reer eus an dilaosk gremm "erodadel, trumm, reñverek, herrek, lec'hiet e steuñvenn louet an empenn" (Jackson), arvez bevedourel eus ar barrad droukfell, a lakaer war wel dre an empennvarwezañ (sl. *décharge épileptique*).

neuronolyse ◇ **neuronophagy** ◇ **neuronloezañ** Distrujañ ar gellig nerved gant al leukokit o deus he aloubet (neuronofagiñ); ne chom evel aspadenn an argerzh nemet un tolpad leukokit a stumm gant ar gellig dispennet; leukokit o tic'henezhañ d'o zro.

neuronophagie ◇ **neuronophagie** ◇ **neuronofagiñ** Anadenn stadet en darn vuiañ eus anafoù lemm an nerved, anezhi eteññ kelligoù neurogliel yaouank en neuronenn hag an dispenn anezhi; tennañ a ra aozerion 'zo d'ober eus an argerzh-se un erzerc'had eus ar fagokitoz (sl. *phagocytose*).

neuropapillite ◇ **neuropapillitis** ◇ **nervvegenno g.** Tanijenn kantet e begenn an nervenn weled, houmañ oc'h anadiñ, dre an oftalmoskop, koeñvet, gouliñvek, gant gwazhiennoù dardennet; o tedreñ peurvuiañ trema isteñv ar vegenn.

neuropathie ◇ **neuropathy** ◇ **nervennaoued g., nerved g.** Anvad genadel an anaezioù nerved, termen arveret dreist oll a-geñver gant anaezioù an nerved trobarzh.

neuropathie achylique biernérienne, syndrome neuro-achylique ◇ ◇ **nervennaoued ansugennel birmerel, azoniad nervansugennel** Furn deroù nerved eus kleñved Biermer, ma tarvez ar strafuilhoù nerved hag an ansugenn lies mizvezh pe lies bloavezh a-raok daralladoù ar gwad.

neuropathie amyloïde ◇ **amyloid neuropathy** ◇ **nervennaoued amiloïdel** Tizhadur nervel o tarvezout e-kerz un amiloidoz hollek kentael, erzerc'h dre strafuilhoù santout-loc'hañ e rezh liesnervennfo an izili traoñ hag, a-wechoù, an izili krec'h, gant darallad an eraeziñ endonel, kevret gant erzerc'hadoù koazhadel ha troazhganadel muiiek; lies furm *n. a.* a zeskriver : *familhel*, aotozomek trec'hek an treuzkas anezho, a stader : *rizh I*, er Portugal (kleñved Corino Andrade), o teraouiñ d'an oad etre 20 ha 30 vloaz, o tedeiñ d'ar fâllezha ha d'ar marv dindan 2 pe 3 bloaz; *rizh II*, er Stadoù-Unanet (kleñved Rukavina er Maryland, Mahloudji en Indiana); *rizh III*, ditouret en Iowa; *rizh IV*, e Suomi hag e Japan; erfin ur *furm skignek*, dibaot, o teraouiñ etre 50 ha 60 vloaz, o tedeiñ etrezek ar marv a-benn 7 da 10 vloaz (sl. *amyloïde : substance* ~, *amyloïdose*).

neuropathie diabétique ◇ **diabetic neuropathy** ◇ **nervennaoued diabetien** Seurtad nervennaoued trobarzh kennevidel o tarvezout gant an diabeiteion o kaout abaoe pell ur gwadusvec'h glukoz uhel ha reolet fall, anezhañ ul liesnervennfo santout-loc'hañ gougel a 'n izili traoñ; arvarekoc'h eo an erbedad pa vez tizhet ar reizhiad nervstruzhel.

neuropathie métabolique ◇ **metabolic neuropathy** ◇ **nervennaoued kennevidel** Nervennaoued trobarzh diwar strafuilhad an dazgweredoù bevgimiek ampleget gant arwastadeg ar bevedeg; ar re liesañ eo an *n.* diabetien ha *n.* ar skorted lounezh henek; dibaotoc'h eo *n.* an disglobulinemiezh, kleñvedoù Refsum ha Fabry, ar borfiriezh hag an amiloz (sl. *amyloïdose*, *dysglobulinémie*, *équilibre 3*, *insuffisance rénale chronique*, *neuropathie amyloïde*, *neuropathie diabétique*, *neuropathie périphérique*, *porphyrie*, *Refsum : maladie de* ~).

neuropathie optique ◇ **optic neuropathy** ◇ **nervennaoued gweledel** Anvad genadel anaeziou an nervenn weled : *1)* ar *glaukomoù*, *2)* an *anaeziou anglaokomatus* : e-touez ar re-mañ e tiforc'her *a)* an tizhadoù *foel*, divielinaus (pe *nervennfo gweledel*, Gl. *névrite optique*, Sz. *optic neuritis*), sk. : skleroz strewek, *b)* an *nervennaouedoù heskwadel araok lemm* (Gl. *neuropathies ischémiques antérieures aiguës*), sk. : kleñved Horton, arterioskleroz, diabet, *c)* dibaotoc'h, an *n.* *pietriel*, *daraezel*, *amwaskel*, *hêrezhel*.

neuropathie paranéoplasique ou parahodgkinienne ◇ **paraneoplastic neuropathy** ◇ **nervennaoued lezhanweel pe lezhodgkinek** Azoniad nervel o tarvezout gant gouzviadeg ur c'hankr, kankr ar bronkez kelligoù bihan pergen, pe kleñved Hodgkin; stadañ a reer lies *rizh* klinikel : loc'hadel, santadel, a orin trobarzhel, a orin kreizel; livardek e vez alies an dedro, dizalc'h diouzh hini ar yoc'henn; dianav e chom ardarzh an tizhad nervel, n'emañ a-geñver na gant un amwask pe un aloubadur yoc'hennel, na gant ur marvennad a orin gwazhiedel, na zoken gant ar prederiadurioù enepkankrek.

neuropathie périphérique ◇ **peripheral neuropathy** ◇ **nervennaoued trobarzh** Nep tizhadur eus ar reizhiad nervel trobarzh ne vern pere eo load hag astennad an anafoù, an azoniadur (santadel, loc'hadel, struzhel), neuz an dedroadur (lemm, goulemm pe henek), an arbenn (kennevidel, mezhurel, pietriel, poreel, gwazhiedel, hangaeel, lezhanweel, hêrezhel); kemparzhkek pe get e vez glennad an *n. t.*; *a)* *unnervennaoued* (sl. *mononeuropathie*) a reer eus an *n. t.* *ankemparzhkek*, hag int unel (sl. *mononévrite*) pe liesel (sl. *multinévrite*), alies a orin gwazhiedel; *b)* *liesnervennaoued* (sl. *polyneuropathie*) a reer eus an *n. t.* *kemparzhkek*; mar bez o gwikefre un divielinaat eus feur Schwann, e komzer eus *liesgwrizeniñfo* (sl. *polyradiculonévrite*); mar bezont a orin aksonek, ez eus anezho *liesnervennfoioù* (sl. *polynévrite*).

neuropathie sensitive héréditaire ◇ **hereditary sensitive neuropathy** ◇ **nervennaoued santadel hêrezhel** Anvad lakaet war daou anaeg diforc'h : ar *rizh I* pe kleñved Thévenard (sl. *acropathie ulcéromutilante*); ar *rizh II*, dibaotoc'h, grevusoc'h, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, a stader gant ar vagadell.

neuropathie tomaculaire ◇ **tomaculous neuropathy** ◇ **nervennaoued tomakulel** Kleñved familhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, naouus, *ent neuziadurel*, dre devadurioù o reiñ ur furm silzigennoù d'ar feurioù mielin, *ent klinikel*, war an oadour yaouank, dre varradoù seizi ha kammeraez adfeilhus o tizhout an nervenn a-spilhenn boutin ha nervennoù an ezel krec'h; nes e ve furmoù 'zo a 'r c'hleñved da azoniad Parsonage ha Turner.

neuropathologie ◇ **neuro pathology** ◇ **nervgleñvedouriezh** b. Rann ar Gleñvedouriezh o plediñ gant anaeziou ar reizhiad nervel.

neuropeptide ◇ **neuropeptide** ◇ **neuropeptid** g. Anvad genadel an hanteradoù kimiek peptidek, borc'het gant ar reizhiad nervel kreiz, sk. : ar *morfinoù endeuat* (sl. *endorphine*), an *danvezenn P* (sl. *P : substance* ~); an *neuropeptid Y* (Gl. *neuropeptide Y*) zo ur gwazhiedstrishaer.

neuropharmacologie ◇ **neuropharmacology** ◇ **nervliaoniezh** b. Studi gwered al liaoù war an nervreizhiad kreiz.

neurophy lactique ◇ **neurophy lactic** ◇ **1 nervergostus** aa. **2 nervergostel** aa. 1 O wareziñ ar reizhiad nervel. 2 A-zave d'an nervergost.

neurophy laxis ◇ **neurophy laxy** ◇ **nervergostañ**, **nervergost** g. Gwareziñ ar reizhiad nervel.

neurophy sine ◇ **neurophy sin** ◇ **neurofizin** g. Danvezenn bolipeptidek borc'het gant ar gouzerc'hvel e ser ar vazopresin hag an okitokin, araezer an dezougen anezho etrezek an drekgougorfenn.

neurophy siologie ◇ **neurophy siology** ◇ **nervvedouriezh** b. Studi arc'hwelerezh ar reizhiad nervel.

neuropile ◇ **neuropil** ◇ **neuropil** g. Keflugad doues aksonoù, dendrit hag elfennoù eus an neuroglia, dezhañ un neuz feltrek loet er steuñvenn louet.

neuroprobisie ◇ **neuroprobasia** ◇ **nervverankañ** Treledañ viruzoù nervgerc'h 'zo (eror, konnar, louetvelfo) a-hed ar strelloù nervel.

neuropsychochimie ◇ **neuropsychochemistry** ◇ **nervvredkimiezh** b. Studi an dazgweredoù kimiek a-gesout gant arc'hwel an nerveg hag oberiezhoù ar bred.

NOTENN : An araogenn *a-gesout gant* a ginnigan arverañ evit arouezñ ar c'heñver etre arvez buhezel, arvez bevedel hag arvez alvezel pa revez daou pe an tri anezho en un devoud (sl. La-11 231, v° **kesoutañ**).

neuropsychologie ◇ **neuropsychology** ◇ **nervvredoniezh** b. Studi ar c'heñverioù etre arc'hwelioù an naoudezh (Gl. *fonctions cognitives*) hag ar realezh diouzh un tu ha, diouzh an tu all, arc'hwelerezh an empenn (sl. **2 cognition, 3 test**).

neuropsychopharmacologie ◇ **neuropsychopharmacology** ◇ **nervvredliaoniezh** b. Studi al liaoù o telanvadiñ arc'hwelerezh an empenn hag oberiezhoù ar bred.

neuroradiologie ◇ **neuroradiology** ◇ **nervskinouriezh** b. Skinouriezh dedalvezet d'an nervouriezh.

neuroréactivation ◇ **neuroreactivation** ◇ **nervzraogañ** Lakaat azonoù un nervanaez da anadiñ en-dro (sl. **réactivation 3**).

neurorécepteur ◇ **neuroreceptor** ◇ **nervvuzer** g. -ioù Er sinaps, elfenn ardraoù o tegemer an hanterad kimiek borc'het gant an elfenn argrec'h; diouzh an dro, ez eus un *n. eus* dendrit ur gellig nerval, pokenn loc'hañ ur gigenn, koc'henn kelligoù gwagrenn, h.a. (sl. **dendrit, médiateur chimique, plaque motrice, synapse**).

neurorétinite ◇ **neuroretinitis** ◇ **nervluc'hsaefo** g. Darallad an deun lagad naouus dre gouliñv, naouezennoù ha gwadliñvoù ar vegenn, skleroz an talmerennoù, isteñv nervenn ar gweled, anezhañ rouestlad al lounezhoù hag an uswask talmerel.

neurorrhaphie ◇ **neurorrhaphy** ◇ **nervenndlita** Krafaelañ an daou benn eus un nervenn bet skejet.

neurosarcome ◇ **neurosarcoma** ◇ **neurosarkom** g. Yoc'henn yud fibroblastel (sarkom) an nervenn.

neurosciences ◇ **neurosciences** ◇ **nervskiantoù** l. (b.) Teskad ar bonimbourc'hioù war vevedouriezh ha kleñvedouriezh an nerveg.

neurosecrétion ◇ **neurosecretion** ◇ **nervvorc'hañ** Danzen dedaoladoù hormonel gant kelligoù nerval 'zo (re ar gouzerc'hvel pergen) (sl. **médiateur chimique, neurohormone, neurorécepteur, neuro-transmission**).

NOTENN : Gant aozerion 'zo e kaver termenou all ken- pe heñvelster : *neurocrinie* (P. Masson ha L. Berger, 1923), arveret ivez da arouezñ gwered hormonou 'zo war ar gwiad nerval, *neuricrinie* (G. Roussy ha M. Mosinger, 1937).

neurospongiome ◇ **neurospingioma** ◇ **neurospiongiom** g. Seurtad yoc'henn empenn (gliom) aloubus, o tarvezout gant ar bugel dreist holl, o sezañ e par an ilpenn hag ar pevare kambr, erzerc'h da gentañ dre un azoniad a 'l linenn greizer, oc'h emastenn d'an hanterennoù ilpenn ha d'ar mel a-livenn; goude ezvenet ez adfeilh kentizh (sl. **syndrome de la ligne médiane**).

neurostéroïde ◇ **neurosteroid** ◇ **neurosteroid** g. Steroid enaozet en empenn adal ar c'holesterol.

neurostimulation ◇ **neurostimulation** ◇ **nervfraouaat** Tredanfraouaat ar reizhiad nerval (sl. **électrostimulation**).

neurotensine ◇ **neurotensin** ◇ **neurotensin** Polipeptid bezant er gouzerc'hvel hag e rannbarzhioù all eus ar bevedeg (kanol vezhur), gantañ perzhioù glukozusvec'hiañ; fraouaat a ra borc'herezh hormonou ar c'hougorfenn (hormonou somatotropek ha gonadotropek, prolaktin), lakaat da argezañ kigennoù levn ar pervez, leiaat borc'hadur trenkek ar stomok ha frankaat ar gwazhied bihan.

neurotmésis ◇ **neurotmesis** ◇ **nervenvezvidañ, ezvidañ (nervenn)** Daraez un nervenn drobarzh o tevoudañ un odead klok en he gwiennoù ha dic'henezhadur an tamm pellek anezhi (sl. **axonotmésis, neurapraxie**).

1 neurotome, neuromère 2 neurotome ◇ **1 neurotome, neuromere 2 neurotome** ◇ **1 neurotom g. -où, neuromer g. -où 2 nevrotom g. -où** 1 Pep hini eus an hanrannoù a orin mezodermel stalet er rizhell en daou du d'ar ganol arc'hnerveg, hanrann eus reizhiad nerval kreiz ar rizhell o revout en ur metamer (sl. **métamérie, métamérie cutanée, myotome**). 2 Benveg arveret evit flañchañ pe diskejañ an nervennoù.

neurotonie, dystonie neurovégétative ◇ **neurotonia, neurovegetative disorders** ◇ **"neurotoniezh"** b., **diruzhioù** l. (b.) **nervstruzhel, mieniñv** g. Bodad ledan ha dispis strafuilhoù anglevet gant ar gouziviad kentoc'h eget stadet gant ar mezeg : fromidigezh, kizidigezh kantaezel, noa silwink, argemmusted tead ar galon hag an anal, desellet ken evel doareoù a 'n neuzid, ken evel digempouezioù broudadusted etre an nervreizhioù simpatek ha parasimpatek; gant mezeion 'zo e vez arveret Gl. *neurotonie, dystonie*, h.a. c'hoazh en o darempredoù gant an arvalion.

NOTENN : Kinnig a ran derc'hel ar gedrann *-tant-* evit arouezñ an tennder kaherel nemetken hag he dilezel pa reer anv eus "broudadusted an nerveizhioù simpatek ha parasimpatek" — dav enta adskrivañ melladoù eus ar Geriadur-mañ, ar re titlet *amphotonie, dystonie 2* da skouer, en ur erlec'hiañ *broudadusted* (pe *-broud* hepken) ouzh *-tant-* er c'hevatalioù brezhonek.

neurotoxine ◇ **neurotoxin** ◇ **nervdoksins** g. Toksin o werediñ war an nerveizhiad kreiz dre zevoudañ seizi ha dargrezañ (binim ar c'holubrideged, toksin difterek, toksin tetanek, h.a.).

neurotoxique ◇ **neurotoxic** ◇ **1 nervbistrius aa. 2 nervbistrienn b. 3 nervbistriel aa.** 1 A-zivout un danvezenn, en araez da geuziañ an nerveg. 2 Danvezenn nervbistrius. 3 A-zave d'an nervbistriennoù pe d'o gweredoù.

neurotoxique : syndrome ~ ◇ ◇ **azoniad nervbistriel** Furm c'hrevus eus toksikoz ar vagadell, azoniad yud naouus dre erzerc'hadoù nerval ha gwazhiedloc'hadel (sl. **toxicose 2**).

neurotransmission ◇ **neurotransmission** ◇ **nervdreuzkas** Tremen an nervlanv etre an neuron (sl. **médiateur chimique**).

neurotrope ◇ **1 neurotropic** **2 3 neurotrope** ◇ **1 nervgerc'h** aa. **2 nervwezhus** aa., **nervwezher** aa. **3 nervwezher** g. -ioù 1 (Kleñv edouriezh) tuet da dizhout ar gwiad nerval, sk. : *viruz, kontamm nervgerc'h*. 2 (Yac'hadouriezh) a-zivout ul lia, o werediñ war an nerveg. 3 Lia nervwezher (sl. *psychotrope*).

neurotrophine ◇ **neurotrophin** ◇ **neurotrofin** g. Parenn greskiñ ar c'helligoù nerval, sk. : an *NGF (nerve growth factor)*, ar *BDNF (brain-derived neurotrophic factor)*.

neurotrophique ◇ **neurotrophic** ◇ **nervdeñvel** aa. A-zivout ar strafuilhoù teñvañ a orin nerval.

neurotropique ◇ **neurotropic** ◇ **nervgerc'hel** aa. A-zave d'an neurogerc'h.

neurotropisme ◇ **neurotropism** ◇ **nervgerc'hañ, nervgerc'h** g., **nervgerc'husted** b. Lenusted hanbarek ouzh ar gwiad nerval a zo gant danvezennou kimiek pe gant spesadoù garvevion.

neurotubule ◇ **neurotubule** ◇ **nervbibell** b. Korrbibell loet er gwiad nerval (sl. *microtubule*).

neurovessie ◇ **neuropathic bladder** ◇ **c'hwezhihell** b. **nervadien** Strafuilhoù kelc'hstrishaer a 'r c'hwezhihell e dianlen anafoù er mel alivenn : andalc'h, tenndroazh, poreadoù troazhadel, grouanegezh lounezh, usvoll ar forzh degorzhañ uhelañ.

neurulation ◇ **neurulation** ◇ **neuruladur** g. Furmidigezh kanol an arc'hnerveg, eginenn ar reizhiad nerval kreiz (sl. *chorde*).

(-)*neur(-), (-)nerv-*

- *affection neurologique* nervanaez, nervad • *aneurine* aneurin • *cellule nerveuse, neurone* kellig nerval, nervgellig, neuronenn
- *cellule neurosécrétoire* kellig nervvorc'hañ • *centre nerveux* nervgreizenn • *conduction nerveuse* nervren • *coor-dination (neurologique)* kedren • *crête neurale* kribenn an arc'hnerveg • *d'origine neuropathique* nervadien • *dermatoneurose* kroc'hennervad
- *électronéurographie* nervennvarwezañ • *épineurectomie* eznervennevenañ • *esthésioneuroblastome* estezioneuroblastom
- *fibre nerveuse* nervwienn • *ganglioneurome* gangliourom • *gouttière neurale* andenn an arc'hnerveg • *influx nerveux* nervlanv
- *innervé* nervaouet • *jonction neuromusculaire* juntad nervenn-kaher • *maladie neurologique, nerveuse* naoued nerval • *motoneurones* motoneuron • *nerveux, neurologique* nerval • *neurasthénique* neurasteneg • *neuroacrophathie* nervangreizhegezh • *neuro-analeptique* nervsreer • *neuroblastes* neuroblast • *neurobrucellose* nervvrkelloz • *neurochirurgie* nervsurjianerezh • *neurocutané* nervgroc'henel • *neurodysleptique* nervviretis, nervvireer • *neuroectodermique* neuroektodermel • *neuroendocrinien* nervenborc'hadel • *neuro-épithélium* neuroepitelienn • *neurofibrille* nervwian • *neurogénique, neurogène, nerveux* nervien • *neuro-hématique* nervwadel • *neurohormonal* nerval-hormonel • *neurohypophyse* drekgougorfenn • *neurologique* nervoniell, nervvourel, nerval • *neuroleptique* nervisreüs, nervisreer, neurolepteg • *neuromusculaire* nervgaherel • *neuromédiateur* nervhanterad • *neurone moteur* neuronenn loc'hañ • *neuropathie* nervennaoued, nervad, nervanaez • *neuro-plégique* nervisreer • *neuropsychique* nervvredel, brednerval • *neurosecrétion* nervvorc'had • *neurosensoryel* nervskiantennel • *neurostimulant* nervsreer • *neurotonie* mieniñv • *neurotonique* mieniñvek • *neurotransmetteur* nervdreuzkaser • *neurovasculaire, vasculoneurveux* gwazhiednerval, nervwazhiedel • *neurovégétatif* nervstruzhel • *neuroviscéral* nervflugezel • *névralgie* nervost • *protoneurones* proto-neuron
- *système nerveux* reizhiad nerval, nervreizhiad, nerveg • *système nerveux central, périphérique* nerveg kreiz, trobarzh • *tissu nerveux* gwiad nerval, nervwiad • *tonus neuropsychique, sthénie, énergie, force vitale* eniñv • *tube neural embryonnaire* kanol an arc'hnerveg, arc'hnerveg.

neutralisation oculaire ◇ **uniocular suppression** ◇ **disgwedeñ** Astaliñ merzhout ur skeudenn pe un arvez skeudenn luc'h-saeel, anadenn an heudiñ bredvevedel (sk. : *anverzhout bonan an daouwel*) pe gleñvedel.

neutropénie ◇ **neutropenia** ◇ **olneutrofil** g., **olneutrokit** g. Gwennisriñv o tizhout ar granulokit neutrofil ; a-wechoù anaev ganedigel (o. *korek henek*, Gl. *n. cyclique chronique*), kiriek da stadoù nevez hangaeel (sl. *agranulocytose*).

neutropénie splénique, splénomégalie neutropénique ◇ **splenic neutropenia** ◇ **olneutrofil felc'hel, felc'husvent** g. **olneutrofilel** Anaev dibaot tre, naouus dre ur felc'husvent muiel, un amwad gant olgwen hag isriñv ar granulokit neutrofil ha dre un hiraat a 'n amzer wadañ ; dedreiñ a ra a-frapadoù ha pareañ alies dre felc'hezvenañ.

neutropénique ◇ **neutropenic** ◇ **1 olneutrofilek** **2 olneutrofilel** 1 Gant an olneutrofil. 2 A-zave d'an olneutrofil.

neutrophile(s) ◇ **neutrophil(s)** ◇ **1 neutrofil** aa. **2 granulokit** s. **neutrofil, neutrofil** s. 1 A-zivout an elfennoù luniek lenidik ouzh livuzennoù ken bazek ken trenkek. 2 Seurtad granulokit lieshoskek o c'hraoñell (alese o anvad kent dispredet *polinuklear*, Gl. *polynucléaires*), karget o frotoplasm gant greunennadoù neutrofil munut kenan, piaouet ganto arc'hwel ar fagokitoz (sl. *phagocytose*).

Neville : **maladie de ~** ◇ **Neville disease** ◇ **kleñved Neville** Empennaoued familhel argreskus dibaot gant dreistkarg lipid nervflugezel, erzerc'h peuregetket dre ul lagadseizi dreistgronnel o tizhout fiñvoù a-zerc'h ar boullou lagad, un avufelc'husvent ha bezañs histiokit glas-mor er mel eskern (sl. *histiocytes bleu de mer* : *syndrome des ~*).

névralgie ◇ **neuralgia** ◇ **nervost** b. -où Azoniad naouus dre lauriou emdarzh pe gwezhiet, diastal pe grezvarrek, o sezañ war dreug an nervennoù.

névralgie faciale, névralgie du trijumeau, prosopalgie ◇ **facial neuralgia** ◇ **nervost an dremm, nervost trigevell, dremmost** b. Nervost o sezañ e tiriad an nervenn drigevell pe unan eus he barroù ; diforc'hiñ a reer : 1) an *n. hennadek* (Gl. *n. essentielle*) pe *kleñved Trousseau*, spanaus, o tedreiñ dre varradoù trumm, grizias, un nebeut eilennoù pad, peurliesañ delanket gant ur gentrigradenn, etrezo prantadoù kalm chok, 2) *n. azoniek*, diseurt o arbennoù hag o arvez klinikel (sl. *algie craniofaciale, algie vasculaire de la face, tic douloureux de la face*).

névralgie du ganglion géniculé, névralgie géniculée, névralgie de Ramsay-Hunt ◇ **geniculate neuralgia** ◇ **nervost ar gangrenn a-c'hlin, nervost ac'hlin, nervost Ramsay-Hunt** Nervost naouus dre al laur diastal sezet er skouarn, gant iseraez e pleg ar skouarn hag en ode diavaez ar c'hleved, devoudet peurliesañ gant ar senkl er gangrenn a-c'hlin war un dro gant un dispuilhad c'hwezigennoù e-barzh krogen ar pleg skouarn hag ur seizi a 'n dremm; hervez Hunt, e revezfe ur furm all a nervost a-c'hlin, leteñvel ent klinikel ouzh simpatos an dremm (sl. *algie vasculaire de la face*).

névralgie du glossopharyngien ◇ **glossopharyngeal neuralgia** ◇ **nervost teod-gargadenn** Nervost sezet e rannbarzh ank ar c'haved ha diaz an teod, o saezhenniñ trema ar skouarn hag an hueg, naouus dre laurioù garv, untu, o tedreiñ dre varradoù grezvarrek delanket dre ar fiñvoù lonkañ dre douch an hueg; anezhi furmoù hennadek ha furmoù azonus d'ur yoc'henn a 'r c'hogn pont-ilpenn, a 'r c'havom, a 'r c'hargadenn, a 'n teod, a 'n hueg pe d'ur glomangiom (sl. *angle : tumeur de l'~, glomique : tumeur ~*).

névralgie testiculaire, orchialgie ◇ ◇ **nervost ar glidenn, klidennost** b. Laurioù feuls ha dalc'hus, o saezhenniñ adalek ar gousac'h betek ar c'hof, o tarvezout a-wechoù da heul un argellfo.

névralgies méningées localisées ◇ ◇ **nervostoù pilhonel lec'hiek** Laur talmus tal-kitem kresket gant ar strivoù oc'h uhelaat ar gwask enlivennel, kevret gant daeraouiñ ha frinaouez; pareet e vez dre skejañ nervenn al lagad (barr eus an nervenn drigevell).

névraxe ◇ **neuraxis** ◇ **nervahel** g. Nervreizhiad kreiz, ouzh he ober ar mel penn hag ar mel a-livenn.

névraxite ◇ **neuraxitis** ◇ **nervahelfo** g. Tanijenn an nervahel; *n. darreuziat* (Gl. *n. épidémique*) (sl. *encéphalite épidémique d'Economo-Crucet*); *n. trolernus pe trolern darreuziat* (Gl. *n. vertigineuse pe vertige épidémique*), naouus dre un deroù trumm, trolernioù feuls, a-wechoù c'hweladoù, un derzhienn leiek hag un dedro herrek trema ar pare; un empenngo viruzel e ve.

nevraitique ◇ **neuraxitic** ◇ **nervahelfoel** aa. A-zave d'an nervahelfo.

névrectomie ◇ **neurectomy** ◇ **nervenvezvenañ** Dazbidañ un tamm hir pe hiroc'h eus un nervenn.

névrite ◇ **neuritis** ◇ **nervennfo** g. Anvad genadel anafoù an nervennoù, ken foel, ken dic'henezhadel; e-maez erdal e lezer an nevezweoù; aozerion 'zo a strisha an anvad d'an nervadoù foel.

névrite ascendante ◇ **ascending neuritis** ◇ **nervennfo askennus** Azoniad oc'h anadiñ da heul un anaf nerval pe ur gloazad diforzhus eus an dorn, anezhañ laurioù kriz e rezh devadurioù, diastal gant grezvarroù, lec'hiek da gentañ, en ervez da emastenn ha da ziraez ar vrec'h, ar gouzoug, ar bruska, a-wechoù da dremen d'an eil tu, kevret gant andagoù ha krenadoù (sl. *ostéoporose algique post-traumatique, Sudeck : atrophie de ~*).

névrite hypertrophique progressive familiale, névrite hypertrophique primitive ◇ **progressive hypertrophic polyneuritis** ◇ **nervennfo usteñvel argreskus familhel, nervennfo usteñvel kentael** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, naouus *ent neuziadurel* dre un nervennfo entremezel a 'n nervennoù trobarzh gant usteñv feur Schwann ha darallad ar mielin; *ent klinikel* dre ur seizi gant ur c'haheisteñv o tizhout an eizhaennoù, kahergrehadoù, distummadur an treid (treid kleuz), treuzrakwar, steuz an damougoù, iseraez, usvent an nervennoù trobarzh ha gorrekaat an nerven enno; deraouiñ a ra an anaez er vugeliezh, dre an izili traoñ, ha dedreiñ gorrek kenan; div furm anezhañ a ziforc'her, deanvet *rizh Dejerine-Sottas* ha *rizh Pierre Marie*; deskrivet ez eus bet ivez furmoù gant treuzkas aotozomek enkilek, dibaot, kentratoc'h o deroù, herrekoc'h ha rustoc'h o dedro.

névrite optique rétrobulbaire ◇ **retrobulbar optic neuritis** ◇ **nervennfo gweled drek-boull** Tanijenn nervenn ar gweled loet en adreñv d'ar voull lagad, a-gevenep da dizhadoù ar vegenn.

névrodermie ◇ **essential prurit** ◇ **debron** g. **hennadek** Stroll kroc'hennervadoù ma stader un debron feuls hep erwez kroc'henek (*debron dianaf*, Gl. *prurit sans lésions*).

névroglie ◇ **neuroglia** ◇ **neuroglia** g. Gwiad gouskor an nervreizhiad kreiz, o c'hoarvezout eus ar makrogliia, ar mikrogliia ha kelligoù an endim, pe endimokit (Gl. *ependymocytes*) (sl. *ependyme*).

névrologie ◇ ◇ **nervennoniezh** b. Lodenn eus ar Gorfadurezh o plediñ gant an nervennoù.

névrome ◇ **neuroma** ◇ **neurom** g. Yoc'henn amparet gant gwiennoù nerval reol pe reoloc'h, mielinet pe get, ganedigel lakaet er-maez div nemedenn arzeuat : a) an *n. dianambid* (Gl. *n. d'amputation*), kleizenn baoterus ha laurus evodet diwar eizhaenn nezek un nervenn bet skejet da geñver ambidadur un ezel (sl. *neurogliome*); b) an *n. plezhennek* (Gl. *n. plexiforme*), tolzad nervwiennoù darallet, usventek e lec'hioù 'zo, e rezh ur yoc'henn groc'henn a vent vras, heñvel ouzh ur molluskom, diouti dre an teuta santadur ur pakad kerdinigoù kalet, a stader e kleñved Recklinghausen e par ar malvennoù hag an nervennoù a-werzhid hag a-helmo.

névropathie ◇ ◇ **neuropatiezh** b. Termen eus an 19^t kantved na anavezet ket e orin, bet arveret a-raok oadvezh ar vredvezek-niezh hag ar bredelfennerezh evit arouezañ neurozioù 'zo; boaziet e yezh voutin an 20^t kantved (sl. *neurasthénie, psychasthénie*).

névrose ◇ **neurosis** (l. : **neuroses**) ◇ **neuroz** g. **-ioù** Termen luniet gant ar mezeg skosat William Cullen e 1769 evit arouezañ anaezioù nerval hep direizh organel dinoet; en 19^t kantved, dre ziouer a anaoudegezhioù en nervouriezh e veze renket e-touez an neurozioù kleñvedoù 'zo evel an droukfell, ar c'horea, kleñved Parkinson; gant Sigmund Freud e teraouas un imbourc'h hentennek war ziorreadur ar bred hag an darvoudoù anezhañ (kemplezh Edip o vezañ an anavezetañ); dezhañ omp pleour eus despizadur an neuroz evel anaez diforc'h, kevarall d'ar psikoz (sl. *psychose*), d'an droziadezh (sl. *perversion*), d'ar strafuilhoù bredkreudel (sl. *psychosomatique*), h.a.; en arver e van despizadur freudek an neuroz : "anaez bredien a zo e azonoù an eztaol argelel eus ur c'henniñv bred gwiziennet en istor bugelvezh ar gouzrec'h hag oc'h amparañ un treuzvarc'had etre an eriunañ hag an difenn"

(sl. GBLF § 799); un dek pe pemzek rizh neuroz a zeskrivas Freud, ar re bennañ ha bepred angemeret eo an *neuroz mac'hennel* (Gl. *névrose obsessionnelle*) hag an *neuroz arurel* (Gl. *névrose phobique*).

n vrose d'abandon ◊ **neurosis of abandonment** ◊ **neuroz emzivated** Termen degaset gant an Helvetiz Germaine Gueix ha Charles Odier e 1950, evit aroueziañ un daolenn glinikel ma sour an amgren da vezañ dilezet hag an ezhomm diogelroez, o tarvezout peurliesañ goude koll ul liamm kantaazel gouskorat, o tizhout ken ar vugale, ken an oadourion hag an henaded; deskrivet e vez evel un neuroz ragedipal; erzerc'hañ a ra dre ar gouvid, ar malouen, an enkre, a-wechoù an anc'hrez, an darwantusted, pe an emlazh (sl. *anaclitique : d pression* ~, GBLF 799-812).

n vrose traumatique ◊ **traumatic neurosis** ◊ **neuroz daraezien pe daraezel** Termen kentradet gant Oppenheim e 1889 evit aroueziañ ar strafuilhoù bred o tarvezout gant reuzidi un dirfeud (darvoud an dezougen, koul, gourmest naturel), deskrivet e ser un daolenn glinikel klasel : enkre, skuizhnez, mihun, o vont betek ar strafuilhoù bred muiek : kefroù, arluz, saouzan, malouen (sl. *commotionnel : syndrome* ~); Freud a glokaas deskrivadur Oppenheim dre savlec'hiañ an daraez en istor ar gouzrec'h, a) dre ober anezhañ un delanker o tiskuliañ ul luniad neurozel rakvezant, b) dre deskrivañ an daraez evel deuet gougevan ouzh diemouez ar reuzied, o tasperzhiañ en e wikefreoù hag o tec'han argeziadoù dianerwezhiañ arreet.

NOTENN : Ur yezh resis a c'hallfe dispartiañ an *neuroz daraezien* hervez Oppenheim diouzh an *neuroz daraezel* hervez Freud.

n vrotomie, neurotomie ◊ **neurotomy** ◊ **nervennenbenañ** Skejañ un nervenn, graet peurliesañ evit lakaat fin d'un nervost; n. *drek-kornloarek* (Gl. n. *r trogass rienne*), skejañ gwrizienno, saout an nervenn drigevel etre ar gangrenn gornloarek hag ar pont, graet ouzh an dremmohennadek.

New York Heart Classification, NYHA ◊ **NYHA** ◊ **NYHA** Skeuliad rummañ ar c'halonnaouedoù, 1) hervez an *dianlenad arc'hwelel* : I harz ebet ouzh an oberiezh korf; II harz leiek, III harz muiek; IV diaraezded klok da nep strivadeg korfel; 2) hervez an *ergemennadoù yac'hadel* : A oberiezh reol; B oberiezh ordinal e-maez ar strivadoù agreñv hag ar c'hevezadegoù; C oberiezh ordinal argrennet; D oberiezh leiaet groñs; E skorted kalon, peurbaoez war ar gwele pe er gador vrec'h.

Newcastle : **maladie de** ~ ◊ **Newcastle disease** ◊ **kleñved Newcastle** (eus anvnen ar gêr saoz ma teskrivas Doyle an anaez e 1927) kevresaefo kuñv diwar enkoradur a-zarvoud ar *Paramyxovirus*, viruz evnel nes da hini ar grip (sl. *grippe aviaire*).

newton ◊ **newton** ◊ **newton g.** Unanenn nerzh er reizhiad etrevroadel unanennoù, nerzh o c'houlankañ d'un tolz 1 kg ur c'hwimm 1 m/s (arouez N, atalad mentawouriel : MLT⁻²); unanenn gent : an *din* (arouez dyn, 1 N = 10⁵ dyn).

nez, TA nasus externus ◊ **nose** ◊ **fri g.** Organ ar c'hwesha ha san an analañ, dezhañ stumm ur biramidenn o valirañ ekreiz an dremm a-us d'ar genoù, div igorenn en he zalbenn izelañ, an divfron (TA *nares*), en he diabarzh lodenn araok kavenn ar fri (TA *cavum nasi*).

nez en lorgnette, nez en pied de marmite ◊ **saddle nose** ◊ **fri trouskin** Distummadur ar fri diwar bukadur ar parzh izelañ, ken emañ igorennou an divfron durc'haet war raok; naous d'ar sifiliz ganedigel, d'al liesmigornfo isteñvus henek ha d'an dourbennegezh-bizanskar.

Nichamin : **maladie de** ~ ◊ **familial polycythaemia** ◊ **kleñved Nichamin, elruz g. familhel** Usriñv hemati genezhel, anaez nemedennek kevredet alies gant strafuilhoù enborc'hadel ha nervel.

niche ◊ **niche** ◊ **neizh g.** Skeudenn skinouriezh un angreizh stomok pe daouzegenn ha furmoù 'zo eus kankr ar stomok, disoc'h da leuniadur ur gavenn gleñvedel gant an danvezenn Xdemer, oc'h erzerc'hañ war ar skinlun dre ur balir war lez ar flugezenn (*neizh a-letu*, Gl. *niche de profil*) pe dre ur bokenn o chom war lerc'h karzhadur an Xdemerenn (*neizh a-dal*, Gl. *niche de face*).

nickel ◊ **nickel** ◊ **nikel g.** Elfenn gimiek (arouez Ni, niverenn atom 28, niver tolz 58), metal amoksidadus danvezet e-barzh lies kendeuzad evit kenderc'hañ diroù anoskidadus (dafar surjianerezh, lestroù kegin) pe evel gwiskad (nikelerezh); bezant emañ er bevedeg e rezh nemeurelfenn ereet ouzh an RNA, an nikelwadvec'h reol o vezañ bihanoc'h eget 85 nmol/l (< 5 mg/l); gougemeret e vez 0,4 mg/deiz nikel euvret; da heul an ardizh micherel reñverek ouzh an nikel e stader kankroù ar forzhioù analañ ha tolc'hadur ar reizhiad oksidañ enzimataek; notañ a reer ivez gant kroc'henoù 'zo erwezhioù dreistkizidigezh ouzh ar binvioù nikelet.

Nicolas et Favre : **maladie de** ~ ◊ **venereal lymphogranuloma** ◊ **kleñved Nicolas-Favre, limfogramulomatoz g. gwenerel** Kleñved revdreuzkasadus kiriek dezhañ *Chlamydia lymphogranulomatosis*, erzerc'hat dre ul livant ganadel kevret gant ur c'harrenn a-varlenn en ervez da bugneziañ ha da linañ; e degouezhioù 'zo e stader ur poread fraezh ha youlc'h gant gwerblennfo, a-wechoù rouestlet gant pugnezoù ha fic'hoù troyoulc'h ha strishadur ar youlc'h.

Nicolau : **syndrome de** ~ ◊ **Nicolau syndrome** ◊ **azoniad Nicolau** Kroc'henofo livedoidel ha breingedus a 'r peñs da heul sankadenn enkaherel un aozad dizileizh bet entoet a-zarvoud e-barzh un dalmerenn.

nicotin ◊ **nicotine** ◊ **nikotin g.** Alkaloid pennañ a 'r butun, arveret evel amprevanlazher hag evel gwezher harpañ evit dizonañ ar vutunerion.

nicotinique ◊ **nicotinic** ◊ **1 nikotingevezer aa., nikotinvanek aa. 2 nikotingevele g. -ioù, nikotinvaneg g. -eier** 1 Gant gweredoù heñvel ouzh re an nikotin war ar bevedeg. 2 Danvezenn ganti ur gwered nikotinvan war ar bevedeg.

nicotinique : **effet** ~ ◊ **nicotinic action** ◊ **gwered nikotinvan** Gwered lianiñvel kemplezh war ar juntad nervenn-kaher ha war azhentou kangrennel an nervreizhiad emrenek, leteñvel ouzh hini an nikotin war ar buzerioù nikotinel : d'an doenadoù izel, *gwered n. fraouaat* (Gl. *effet n. stimulant*) war ar sinapsoù kangrennel (ustead kalon, uswask, elanal, mabusvoll, buanaat an amdonnegezh); d'an doenadoù uhel, *gwered n. gouzizañ pe kangrenndolc'hañ* war an nervreizhiadoù parasimpatek da gentañ ha simpatek (Gl. *effet n. d presseur pe gangliopl gique*) (sl. *gan-gliopl gique, r cepteur nicotinique*).

nictation, nictitation ◇ **nictation** ◇ **gwilc'hata** Blinkañ reñverek a-fet aliested pe a-fet pad serriñ a 'r malvennoù (sl. *blépharospasme, bléfarotic*).

nidation ◇ **nidation** ◇ **ennezhiañ** Prantad ma englen ar vi speriet ouzh an enkrozhenn, etre ar 7t hag an 10t devezh goude ar frouezhigñ.

Niederhoffer-Egidy : méthode de von ~ ◇ **Niederhoffer-Egidy method** ◇ **hentenn Niederhoffer-Egidy** Kalvezder addiorren ar rakwareion dre araez arghezadoù keitvent kigennoù kostezel ar c'hef.

Niemann-Pick : maladie de ~, histiocytose lipoidique essentielle ◇ **Niemann-Pick disease** ◇ **kleñved Niemann-Pick, histiokitoz lipoidel hennadek** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod enkilek aotozomek oc'h anadiñ er bugelvezh kentañ, o trediñ herrek d'ar marv, oc'h erzerc'hañ dre ur paouez kreskiñ, gouliñvoù, terzhienn, strafuilhoù koazhadel, disvezhur gant usvent ar felc'h hag an avu, livegad kroc'hen melen, istantegezh ha dilerc'hegezh don; ent vevoniel e stader ur gwadusvec'h lipid muiek, test d'ul lipoidoz ar felc'h hag an avu gant dreistkarg sfingomielin, e dianlen ezvezañs un enzym, ar sfingomielinaz.

Nikolsky : signe de ~ ◇ Nikolsky sign ◇ **aruez b. Nikolsky** Disfaout gwelead gorre an epiderm graet dre bouezañ-linkañ beg ar biz war an amwiskadoù, oc'h erzerc'haat laosked ar glenañ etre an haenadoù, proud o lakaat war wel argerzh an akantoliz, hag o turc'haat etrezek deznaou ar pemfiguz gwir (sl. *pemphigus vrai*).

ninhydrine : test ou réaction à la ~ ◇ **ninhydrine reaction** ◇ **erwez g. ouzh an ninhidrin** Studi ar c'hwezparañ e par ar bizied; arloet e vez mezal ar re-mañ ouzh ur baperenn : dre arwerc'hañ ar baperenn gant un dileizhenn ninhidrin ez anad ar roud eus igorennoù ar gwagrennoù c'hwezparañ, amprouenn oc'h araezañ studi ergorek an eraeziñ kroc'hene (diwar gouliadur un nervenn da skouer), rak an un tiriad zo d'an aneraez ha d'ar c'hwezpanpar.

Nishimoto : maladie de ~, moya-moya ◇ **Nishimoto disease** ◇ **kleñved Nishimoto** Anaez dianav e orin, bet deskrivet e Japan da gentañ, o tizhout ar grennarded, naouus dre resmiadoù nerval berrbad hag adfeillus : sezioù (led- pe unseizi), glizi, gwadliñvoù pilhon, darallad ar gwelvaez, e dianlen steviadur argreskus lodenn araok kelc'h talmerennoù an empenn; an talmerennluniñ a laka war wel un iswe daoudou eus an ahel karotidel en e bezh gant dispakadur ur rouedad dasforzhadek talmerennigoù munut dezho neuz ar "moged sigaret" (Jp. *moya-moya*).

nitrés : dérivés ~ ◇ **nitrate compounds** ◇ **nitraozadoù l. (g.)** Esterioù nitrek a zelun R-O-NO₂, deveradoù diwar an nitroglikerin, arveret abaoe pell da brederiañ ar skorted kurunerel ha, nevez 'zo, ar skorted kalon; ganto ur gwered enebandag (pe arlaoskiñ) war gaherwiennoù levn ar gwazhiennoù hag an talmerennoù, e kendaolont da leiaat ar rakkarg hag ar goudekarg er c'hofig ha da frankaat an talmerennoù kuruner; arveret e voe da gentañ an nitrit amil, hiziv ez erskriver ar mono- pe an dinitrat izosorbid, an trinitrin (pe nitroglikerin), an tetranitrat entritil pe pentaeritritil; hervez an degouezhioù e tiounezer an *n.* dre an hentoù gwazhiennel pe enteodel evit ar prederiadurioù berr, dre an hentoù euvradel pe enkroc'hene evit ar prederiadurioù hir (sl. *méthémoglobinémie*).

nitriturie ◇ **nitrituria** ◇ **troazhnitritegezh b.** Bezañs nitritoù (halioù pe esterioù an drenkenn nitrus) en troazh, o testiñ neridigezh ar bakteri.

nitrobleu de tétrazolium : épreuve ou test au ~ ◇ **nitroblue tetrazolium dye test** ◇ **prouad an nitroglaz tetrazolium** Prouad arveret evit priziañ bakterilazhusted ar granulokit : o lakaat a reer da fagokitañ rannigoù lateks intret gant *n. t.*; pa vez reol an traoliañ fagokitel, e vez dilaosket H₂O₂ a zire an *n. t.* e nitroformazan hag e teu ul liv glas war ar granulokit; ezvezañs al livadur a verk ur fagokitañ ezreol dre zivig enzimatek (stadoù negez hangaeel, er granulomatoz lestel argammedek da skouer) (sl. *granulomatose septique progressive*).

nitroglycérine, trinitrine ◇ **nitroglycerine** ◇ **nitroglikerin g., trinitrin g.** Trinitrat glikeril, bloskuzenn c'halloudek, arveret er vezekniezh en askont d'e berzhioù gwazhiedfrankaat evit prederiadur trummat ar c'hlaz kalon ha dre vras holl erzerc'hadoù ar skorted kurunerel.

Noble : signe de ~ ◇ ◇ **aruez b. Noble** Arouez klinikel kentrat a 'r vrazezded : merzhout dre an touch gouinel kresk ec'honad ar grozh aet bolzennek, barret pukadenn reol asplegoù kostezel krommenn ar gouin.

nocardiose ◇ **nocardiosis** ◇ **nokardioz** Kleñved diwar bakteri eus ar genad *Nocardia* (sl. *actinomycose*).

nocebo : effet ~ ◇ **nocebo effect** ◇ **gwered g. nokebo** A-gevenep da *plakebo* (sl. *placebo*), asvan lia o kaout gweredoù ul lia gwir dre ur wikefre vredel, ez arouez *nokebo* un asvan lia a zeu diwarnañ gweredoù displijus pe noazus dre berzh un emell eus bred ar gouziviad.

nocicepteur ◇ **nociceptor** ◇ **laureraezer g. -ioù** Fraouva (sl. *récepteur sensitif*) a sav dioutañ un eraezad laur, forzh pe wered alvezel a ve ouzh e gentriñ.

nociceptif ◇ **nociceptive** ◇ **laureraezus aa., laureraezer aa.** O sevel dioutañ an eraezadoù laur (sl. *réflexe de défense*).

NOTENN : Un arver all, ankewer, zo bet da Gl. *nociceptif* gant ar ster : "azivout ur gentrigenn o tevoudañ un displeberad er gwiadou", eleze gant unan eus kemeradurioù Gl. *nocif*, Br. *argevezus* (sl. *innocuité, nocuité*, La-10 181).

nociceptive : excitation nerveuse ~ ◇ ◇ **broudadur g. nervargevezus** Broudadur diwar sezenn un daraez, treuzkaset dre ar reizhiad nervstruzhel d'an empenn ma tec'han darwazh ha gouliñv, a ve orin ar bleuzioù daraezel ha diansurjanel.

nocuité, nocivité ◇ **nocuity, noxiousness** ◇ **1 noazusted b. 2 argevezded b., argevezusted b.** 1 Perzh bezañ gaouus, euverus, dañjerus. 2 Perzh da zevoudañ un displeberad e gwiaoù ar bevedeg (sl. *innocuité*).

nodal, atrioventriculaire ◇ **nodal, atrioventricular** ◇ **klomel** aa., ~ **kentezkofig** A-zave d'ar c'hlom kentez-kofig; *ec'ham-zalc'h k.* pe *kevree* (Gl. *échappe-ment n.* pe *jonctionnel*, sl. *échappement, jonction atrioventriculaire*); *dreistsistol k.* pe *kevree* (Gl. *extrasystole n.* pe *jonctionnelle*), *dreistsistol a zo e orin* er c'hlom kentez-kofig; *korvez k.* pe *kevree* (Gl. *rythme n.* pe *jonctionnel*), *roelet gant broudourioù ganet er c'hlom kentez-kofig, naouus dre un istead kalon da 40-50 ha daralladoù ar c'halon-varwezad; kalonustead k.* pe *kevree* (Gl. *tachycardie n.* pe *jonctionnelle*), *kalonustead grezvarrek* (sl. *tachycardie paroxystique*) pe *hirbad, ent klasel diwar werederezh ezreol ur broudalf ezlec'hiat loet e kefin ar c'hlom kentez-kofig* (sl. *réentrée, rythme réciproque*).

nodohis(s)ien ◇ **nodohisian** ◇ **klomhisel** aa. A-zave da lodenn izelañ ar c'hlom kentez-kofig ha da gef an hordenn gentez-kofig (sl. *His : faisceau de ~*).

nodosité ◇ **nodosity, node** ◇ **ozvenn** b. Nep furmadur ezreol dezhañ neuz ur c'horf bihan kalet aront ha kantet strizh; *ozvennoù ar c'horoerion* (sl. *tubercules des trayeurs*); *ozvennoù Bouchard* (sl. *Bouchard : nodosités de ~*); *ozvennoù Heberden* (sl. *Heberden : rhumatisme de ~*); *ozvennoù Meynet* (sl. *Meynet : nodosités de ~*); *ozvennoù remmel* (Gl. *nodosités rhumatismales, Sz. rheumatic nodules*), furmadurioù endan-groc'hen, kalet, anlaur, daskenat o ment etre hini ur ferenn ha hini ur graoñenn, sezet e kefin an arzoù, a stader er remmoù henek ha peurgetket er furmoù hollek gant resmiadoù tanienn (sl. La-18 258-259).

nodule ◇ **nodule, nodulus** ◇ **nozelenn** b. -où, (s. : **nozel**) (Korfadurezh) Tolzenn vihan stirek loet e-kreiz ribl rez sac'helloù ar galon : *n. ar sac'helloù kornloarek* (TA *nodulus valvularum semilunarium*), *n. sac'helloù an aortenn* (TA *nodulus valvularum aortae*); (Naouedouriezh) *ozvenn vihan; n. domm, n. yen* (Gl. *n. chaud, n. froid*), *afoù stadet en adenom pistriek ar skoedenn* (sl. *adénome thyroïdien toxique*); *nozel ar vouezh* (Gl. *nodules vocaux, Sz. singer's nodules*), *balirenoù stirek bihan war ribl rez plegoù ar vouezh diwar an helc'hiñ gant ar ganourion* (sl. *micronodulaire*, La-18 259-260).

noétique ◇ **noetic** ◇ **ernaoudel** aa. A-zave d'an derc'hañ, d'ar meizañ, d'ar poellata, a-gevenep d'ar pezh a denn d'an anglevout (*kantaazel*, Gl. *affectif*) ha d'an ober (*oberel*, Gl. *actif*).

NOTENN : Arzaeladus eo an dibab graet gant ar vredoniourion eus *noétique, noetic*, termen intentet hiziv gant ar ster a zebazhas dezhañ Husserl; aozerion all o deus dec'heriet ar c'heal ambredet dre Gl. *intellectuel*, adanv bec'hiet warnañ meur a wiskad kemeradurioù endeo; Freud a voazie kevenebiñ Al. *vorstellung-* (Br. *derc'had*) ouzh Al. *affekt-* (Br. *kantaez-*); un diskoulm brezhonek all, anezhañ *kantouez-* a-gevenep da *kantaez-*, 'm eus lezet agostez en askont da arverioù prederouriel stank ar bennrannse; Br. *ernaoudel*, en eneb, bet luniet a-zevri evel keveneb da *kantaazel* ha da *oberel*, 'm eus kavet gwel (sl. La10 439).

nœud, TA nodus ◇ **node** ◇ **1 klom g. 2 gwerblenn** b. Furmadurioù ganto arc'hwelioù dibarek : 1 *tolpad kelligoù nerval* (sl. *n. sinusal*) 2 *tolpad kelligoù limfoidel* (sl. *ganglion* 2).

nœud sinusal, TA nodus sino-atrialis ◇ **sino-atrial node** ◇ **klom god-kentez** Hogennad kelligoù nerval loet e-barzh spur ar c'hentez dehou e-kichen god ar gwazhiennoù kav e kefin toull ar wazhienn gav uhelañ, e arc'hwel genel ent emgefreak ar wagenn vroudañ o telankañ argrezadur ar galon; reet e vez an nervlanv e-barzh gwiad ar c'hentez etrezek ar c'hlom kentez-kofig, ha treuzkaset d'ar c'hofigoù dre an hordenn gentez-kofig (sl. *cardionecteur : appareil pe système ~, sinus : maladie du ~*).

noma ◇ **noma** ◇ **noma** g. Genaoufo breingedek o tarvezout gant ar vugale, eilvedel d'ar poreoù (ruzell, skarlegenn, tifoid).

Nomina Anatomica (NA), Parisiensia Nomina Anatomica (PNA) Destladur etrevroadel latin termenou ar Gorfadurezh, prientel ha darbennet gant Kendalc'h Paris (1950) hag azgwelet reoliek abaoe, anvad amsavet e 1998 gant *Terminologia Anatomica (TA)* (sl. GEGO 7-13).

non effractiv ou non invasif ◇ **noninvasive** ◇ **antrewan** aa. A-zivout ur gwezh mezegel na endalc'h ket treuziñ nag ar c'hroc'hen nag ur glourgenn (sl. *effractiv*).

non-sens ou stop ou de terminaison : codon ~ ◇ **nonsense codon, stop kodon** ◇ **kodon g. nonsens, kodon harz, stopkodon** g. Elfenn dibenn eus arrevell an mRNA (trenkenn ribonukleek kannad) (sl. *anticodon, codon*).

non-soi ◇ **nonself** ◇ **allev** g. Holland an antigenoù bet naouaet evel estren gant ur bev; da ziforc'hiñ an *unev* (sl. *soi*) diouzh an *allev* e kendaol kemplezh ar gempadusted wiadel (sl. *histocompatibilité, système HLA*), al limfokit T hag an immuno-globulinou (sl. La-18 318-322).

nonane : fièvre ~ ◇ **nonan fever** ◇ **terzhienn navedek** Terzienn spanaus, dezhi un drovezh nav devezh, ur barr o tarvezout bep navet devezh.

noo-analeptique ◇ **nooanaleptic** ◇ **1 ~usdefraouiñ, usdefraouus** aa., **usdefraouer** aa. **2 usdefraouer** g. -ioù 1 O kentraouiñ an defroù hag ar bredarc'hwelañ. 2 Lia usdefraouus (sk. : an *amfetamineier*, sl. *amphétamine*); renket eo an usdefraouerioù e-touez ar *bredusreerioù* (sl. *psychoanaleptique*).

nootrope ◇ **nootropic** ◇ **1 ~kefredwezhiñ, kefredwezhus** aa., **kefredwezher** aa. **2 kefredwezher** g. -ioù 1 (Yac'hadouriezh) a-zivout ul lia arlakaet e efedusted war an arc'hwelioù kefredel. 2 Lia kefredwezhus (sl. *psychotrope*).

noradrenaline ◇ **norepinephrine** ◇ **noradrenalin** g. Katekolamin enaozet diwar an dopamin, borc'het dreist holl gant kelligoù simpatek ar c'hangrennoù lezlivenn; keverall eo d'an adrenalin dre ezvezañs ur stroll metil war an atomenn nitrogen; hanterad kimiek o fraouaat ar buzerioù adrenwerc'her α, e sav e wered gwazhiedfrankaat hag uswaskañ dreist da hini an adrenalin; ent reol emañ etre 4 ha 5 µg/l ar gwadvec'h ha dindan 100 µg (590 nm)/24 h an troazhvorc'h anezhañ; diounezet e vez an *n. kleizc'hwelus* evit prederiñ ar c'hoempadoù.

noradrénergique ◇ **noradrenergic** ◇ **noradrenwerc'her** aa. 1 O werediñ evel an noradrenalin. 2 A-zave da zilaosk pe da wered an noradrenalin, sk. : *nervennoù noradrenwerc'her* (sl. *adrénergique*).

noreflow ◇ **noreflow** ◇ **anaderouer** g., **noreflow** g. Ezvezañs pe skorted an eroueriañ en ur gurunerenn bet adheforshaet dre wazhiedatelviñ, anataet dre an diouer Xdemeradur a 'n dalmerenn.

normal ◇ **normal** ◇ **1 "reol"** aa., **keitat** aa. **2 reol** aa., **bonan** aa. 1 (Diskiblezhioù deskrivañ) "reol" a lavarer ez eo ar werzhad aliesañ stadet eus un argemmenn; en Hinouriezh, da skouer e klever peurliesañ komz eus gwrezverkoù "reol" evit ar c'houlzad-mañ koulzad, pa na c'hell bezañ anv nemet eus gwrezverkoù "keitat". 2 (Mezekniezh) kemplezh eo despiñ keal ar reol arveret er Vezekniezh, soliet m'emañ, dre ur c'herzhed nad eo ket skiantel, war ar c'hoaliñ a reer pa zoder ergraf ar yec'hed (koaliñ a gaver dec'heriet gant Br. *bonan*, dezneuziet diwar hBr. *bonen* "yac'h, bagol", arveret evel heñvelster da reol); war dachenn ar Vezekniezh, notomp roll ar c'heitat evit heñchañ etrezek ar reol, met ent vezadzel ne oufe ar reol bezañ direct d'ar c'heitat (sl. *équilibration, homéostasie*).

normalité ◇ **normality** ◇ **reolded** b., **bonanded** b. (Mezekniezh) bezañ reol, bonan.

normobare ◇ **normobaric** ◇ **reolamwask** aa. A-zivout un enkae m'emañ ar gwask par d'an aerwask (sl. *dépressothérapie, hyperbare, hypobare*).

normoblastose ◇ **normoblastosis** ◇ **normoblastoz** g. Bezañs normoblast er gwad pe er mel eskern (sl. *érythroblastes*).

normocapnie ◇ **normocapnia** ◇ **carbohevec'h** g. Feur reol ar CO₂ dileizhet er gwad (sl. *capnie, capnimétrie, gaz carbonique : concentration en ~, hypercapnie, hypocapnie*).

normochrome ◇ **normochromic** ◇ **helivel** aa. A livrezh pe a livegad reol (sl. *anémie normochrome, hyperchromie, hypochromie*).

normocytes ◇ **normocytes** ◇ **normokit** s. Kelligoù ruz oadour reol o ec'honad o teverañ diouzh normoblast kollet ganto o c'hraoñell.

normocytose ◇ **normocytosis** ◇ **normokitoz** g. Bezañs er gwad eus kelligoù ruz reol o ment.

normodrome ◇ **normodromous** ◇ **reolre** g. A-zivout treled reol ar blivaerezh er c'haher kalon (sl. *antidromique*).

normokaliémique ◇ **normokaliaemic** ◇ **gwadhevec'h** g. **kaliom**, **kaliomwadhevec'h** g. Feur reol ar c'haliom er gwad.

normolipémie, **normolipidémie** ◇ **normolipidaemia** ◇ **gwadhevec'h lipid**, **lipidwadhevec'h** Feur reol al lipid er gwad (sl. *hyperlipémie, hyperlipidémie*).

normospermie ◇ **normospermia** ◇ **reolsperiegezh** b. Bonanded ar sper, reol ennañ ar spergelligoù a-fet doaread ha kementad.

normothyroïdie ◇ **normothyroidism** ◇ **reolskoedegezh** b. Arc'hwelerezh reol ar skoedenn (sl. *euthyroïdie, hyperthyroïdie, hypothy-roïdie*).

normotope ◇ **normotopic** ◇ **reollec'hiat** aa. A-zivout an argrezadoù kalon diwar ar broudalf reol, eleze ar c'hloim god-kentez (sl. *centre d'automatisme, hétérotope*).

normotype ◇ **normotypic** ◇ **reolluniat** aa. A-zivout an argrezadoù kalon reol ent doareadell.

normovolémie ◇ **normal blood volume** ◇ **reolec'honad** g. **gwad** Reolded ec'honad ar gwad hollel (plasma, kelligoù, gwad amredat, gwad diloc'h er c'hadaveroù) (sl. *hypervolémie, hypovolémie*).

normoxémie ◇ **normoxaemia** ◇ **gwadhevec'h** g. **oksigen**, **normoksemiezh** b. Feur oksigen reol er gwad (sl. *anoxémie, hyperoxémie*).

normoxie ◇ **normoxia** ◇ **gwiadhevec'h** g. **oksigen**, **normoksiezh** b. Feur oksigen reol en ur gwiad (sl. *anoxie, anoxémie*).

(-norm-, anomalie

- *anémie normocytaire* amwad ruzheventel • *angle d'anomalie* korn ezreolder • *anomalie du métabolisme* migennevid • *anomalie enzymatique héréditaire* ezreolder enzimatek hêrezhel • *anormal* ezreol, anreol, disreol • *anormalement faible* diouerek • *cavité anormale* kavenn anreol • *cheminement anormal* kammforzh • *correspondance anormale* migenglot • *correspondance normale* hegenglot • *d'inclinaison anormale* kammstouet • *de sécrétion normale* hevorc'hek • *délire d'énormité* ambren an derveur • *engrènement anormal des dents* kengovladur ezreol an dent • *énorme, énormité* derveur • *énormité* ramzegezh • *hémoglobine anormale* hemoglobin ezreol • *normaliser* reolaat • *normaliser l'hydratation* dourhevec'hiañ • *normalité* reolded, bonanded • *norme* reolad • *normochrome* helivel • *normocytose* ruzhevent • *sain, normal, physiologique* bonan • *normocapnie* karbohevec'h • *normoglycémiant* glukozwadhevec'huis • *réaction anormale* mierwezh • *taux normal d'acidoacidémie* feur bonan ar gwadvec'h amindrenkennoù • *usure normale ou pathologique des dents* uzadur bonan pe gleñvedel an dent.

NOTENN : Peurliesañ, e lavar ar Vezekniezh, e-lec'h *anormalité* e vez arveret da genster Gl. *anomalie*, hag eñ a c'herdarzh kevarall.

Norrie : **maladie de ~** ◇ **Norrie disease** ◇ **kleñved Norrie** Ezreolder hêrezhel enkilek revereet o tizhout ar baotred : dallentez ar vugale dre isteñv ar bouloù lagad, kevret gant ur gaouc'hliom a 'l luc'hsaeoù.

nosocomial ◇ **nosocomial** ◇ **kurdiat** aa. A-zivout ar c'hleñvedoù (ar poreadoù pergen) dastumet gant ar glañvourion er c'hurdiou (ospital, klinikenn, diangurva, ti diskuizh) (sl. *communautaire*).

nosogénie ◇ **nosogeny** ◇ **nozogeniezh** b. Studi arbennoù ha dedreiñ ar c'hleñvedoù.

- nosognosie** ◇ **nosognosia** ◇ **nammdenaoud** g. A-berzh ur c'hlañvour, kaout meiz eus e glañvadur (sl. *anosognosie*).
- nosographie** ◇ **nosography** ◇ **nozografiezh** b. Rummataerezh hentennek ar c'hlañvedoù.
- nosologie** ◇ **nosology** ◇ **nozologiezh** Studi doareoù diforc'hus ar c'hlañvedoù, kevaraez d'an despiñañ ha d'ar rummata anezho.
- nosologique** ◇ **nosological** ◇ **nozologek** aa. A-zave d'an nozologiezh; *stroll nozologek* (Gl. *groupe nosologique*), teskad kleñvedoù pe furmoù eus ur c'hlañved, e dalc'h an un arbenn pe arbennoù kennes : gwezhierioù pore pe arvevadezh, strafuilhoù kennevid, negezioù, kleñvedoù hêrezhel, sk. : stroll paludel, riketsiozoù, lipoidozioù, anvitamin-egezhioù, h.a. ; *rambarzh nozologek* (Gl. *région nosologique*), rannbarzh eus an douaregor naouus dre vuiegezh un pe lies pore.
- nosomanie** ◇ **nosomania** ◇ **klañvreadezh** b. Furm ambreele an hipokondriezh (sl. *hypocondrie*).
- nosophobie** ◇ **nosophobia** ◇ **klañvvarur** g. Amgren mac'hennet da zastum kleñvedoù.
- nostalgie** ◇ **nostalgia** ◇ **hiraezh** b. Stad kantaazel poanius diwar eñvor un tremened bozius, ar c'heuz d'ur vuhez eürus en ur vro, an diouer eus un den pe eus tud karet emeur pellaet diouto ; derezioù hag arvezioù ez eus d'an hiraezh, adalek melkoni romantel ar marvnadoù betek an erwezhoù kleñvedel, ar gouvid, an ambren, an emlzh ; deskrivet eo bet *kleñved ar gêr* (Sz. *homesickness*) gant ar soudarded, *psikoz an orjal dreinek* (Gl. *psychose des barbelés*) gant ar brizonidi vrezel.
- nostras** ◇ **nostras** ◇ **nostras** aa. A-zivout ar c'hlañvedoù naouus d'hon broezioù (sl. *choléra nostras*).
- nourrisson** ◇ **infant** ◇ **magadell** b. -ed, **maban** g.-ed Ent klasel : bugel ouzh ar vronn ; ent devoud, etre kouezh ar funig vegel betek an oad a zaou vloaz (sl. *enfance*).
- nouure** ◇ **node** ◇ **1 ulmenn** b. **2 ozvenn** b. 1 Koeñvenn e talpenn eskern ar vugale lec'hek. 2 Argaledad hevonn eus ar c'houdonenn o vont betek ment ur vi (sl. *érythème noueux*).
- nouveau-né** ◇ **newborn** ◇ **nevezc'haned** g. -idi Bugel adalek e c'hanedigezh betek kouezh ar funig vegel, eleze betek an 10t deiz ; dre astenn ster, betek an 28t devezh ; er vezekniezh lezennel, bugel edoug an 3 devezh kentañ eus e vuhez.
- Nové-Josserand** : **signe de ~** ◇ ◇ **arouez** b. **Nové-Josserand** Arouez oc'h erzerc'haat laoskegezh ezreol ar pourc'had kenvell gant ar vagadelled kenttuat da zisvellad al lez : ar vorzhed disvellet a c'haller kroaziañ betek pleg ar varlenn war ar vorzhed a-eiltu.
- noyade** ◇ **drowning** ◇ **beuziñ**, **beuzadenn** b. Ruradur liñvenn er forzhioù anañ dre sozadur, marvus dre angwentañ ; kemm a lakaer etre ar *beuziñ* hag an *dourgeuziñ* e-keñver gwikefre an angwentañ ha livrezh ar beuzed (sl. *hydrocution*).
- noyau** ◇ **nucleus**, **core** ◇ **1 derc'han** g. **2 kraoñell** b. **3 kraoñell** b. **4 gronn** g. **5 broñsenn** u. (l. : **broñsennoù**, **broñsoù**) 1 (Fizik) parzh kreiz an atomenn, ouzh e ober proton ha neutron. 2 (Kimiezh) pennrann ur volemekenn (sk. *ar graoñell purin*, Gl. *le noyau purine*). 3 (Kelligouriezh) luniad doues e kreiz ar gellig, en dro dezhañ ar goc'henn, anezhañ ar c'hromatin, an nukleotid hag an nukleoplasm. 4 (Korfadurezh) tolpad steuñvenn louet e-barzh an nerveg (sk. *gronn an nervenn dremm*, TA *nucleus nervus facialis*) 5 (Bevedouriezh, Kleñved-ouriezh) tolpad elfennoù en orin furmadurioù all (sk. : *broñsoù askornaat*, Gl. *noyaux d'ossification*).
- noyau rouge**, TA **nucleus ruber** ◇ **red nucleus** ◇ **gronn ruz** Tolpad steuñvenn louet loet er c'hrennempenn, el lodenn araok eus pep troad empenn.
- noyau rouge** : **syndrome alterne du ~** ◇ **inferior syndrome of the red nucleus** ◇ **azoniad dastuat pe izelañ ar gronn ruz** Azoniad pontel o c'hoarvezout, a-gendu : eus seizi nervenn loc'hañ al lagad, a-eiltu : pe eus fiñvoù koreoatetozek hag ustant (azoniad Benedikti), pe eus ul ledazoniad ilpennel (azoniad Claude) kevredet a-wechoù gant un azoniad pikernennek.
- noyau rouge** : **syndrome controlatéral du ~** ◇ **superior syndrome of red nucleus** ◇ **azoniad eiltuat pe uhelañ ar gronn ruz** Azoniad krennempennel naouus, a-eiltu dre un azoniad ilpennel hag un azoniad ampinkernennek (kren diavennel, fiñvoù koreoatetozek ha parkinsoniek, ledankedal), kevret a-wechoù gant arouezioù derc'hvelel hag ul ledazoniad pikernennek (hep tizhad nervenn loc'hañ al lagad) (sl. *carrefour hypothalamique* : *syndrome du ~*).
- noyaux basaux**, TA **nuclei basales** ◇ **basal nuclei** ◇ **gronnoù an diaz** (Bet anvet diagent : *corps opto-striés*, *noyaux opto-striés*, *noyaux gris de la base*, *noyaux gris centraux*, *ganglions de la base*) tolpadoù steuñvenn louet loet e lodenn draoñ an hanterennoù empenn, anezho an derc'hvel (TA *thalamus*) hag ar c'horf rizennek (pe rizennek) (TA *corpus striatum*) amparet gant ar gronn lostek (T *nucleus caudatus*), ar gronn ferek (pe fereg) (TA *nucleus lentiformis*) hag ar gael (TA *claustrum*).
- nubilité** ◇ **nubility** ◇ **dimezusted** b. 1 Stad un den gouest da ouennañ. 2 Dezvad un den atreet da zimeziñ.
- nuclease** ◇ **nuclease** ◇ **nukleaz** g. Enzim borc'het gant glaourgenn ar pervez, en araez da ec'haozañ an trenkennoù nukleek (sl. *nucleoprotéide*) en elfennoù eeunoc'h ; n. ez eus eus ar polinukleotidaz, ar fosfataz hag ar nukleozidaz ; kedrannoù eus an erepsin eo an n. (sl. *erepsine*).
- nucléocapside**, **nucléotide** ◇ **nucleocapsid**, **core** ◇ **nukleokapsid** g., **nukleoid** g. Kenaozad ar c'hapsid hag an drenkenn nukleek viruzel (sl. *décapsidation*).
- nucléole** ◇ **nucleolus** ◇ **nukleolenn** u. Korfig pellennek bezant e kraoñell ar gellig, lec'h enaozañ an drenkenn ribonukleek.
- nucleolyse**, **chémoneucléolyse**, **chimionucléolyse** ◇ **chemoneucléolysis** ◇ **gronnloezañ**, **kimgronnloezañ** Dispenn ar gronn bouedennek (TA *nucleus pulposus intervertebralis*, Sz. *pulpi nucleus*), parzh kreiz bouk an disk etre-melloù, dre ensinklañ un enzim proteinloezus, ar c'himopapain, hentenn brederiañ degouezhioù kilvers 'zo a 'n diskogad ; tennañ a reer hiziv da zilezel ar sankadennoù kimopapain e gouind ar sknadoù laser.

nucléophagocytose ◇ **nucleophagocytosis** ◇ **nukleofagokitoz** g. Pakañ ha dispenn kraoñelloù kellig gant ar fagokit (granulokit neutrofil peurliesañ ar re-mañ).

nucléoplasme ◇ **nucleoplasm** ◇ **nukleoplasm** g. Protoplasm ar graoñell.

nucléorthèse ◇ **nucleorthese** ◇ **nukleortez** g. Gronnløezañ dewerc'het dre araez ar c'hortikoidoù (sl. *nucléolyse*).

nucléosidase ◇ **nucleosidase** ◇ **nukleozidaz** g. Enzim borc'het gant glaourgenn ar pervez, oc'h ec'haozañ an nukleozidoù bet dilaosket dre ar fosfataz etre glukid ha bazennoù purek pe pirimidek.

nucléoside ◇ **nucleoside** ◇ **nukleozid** g. Ozid ouzh e ober ur pentoz (riboz pe dezoksiriboz) hag ur vazenn burek pe pirimidek.

nucleosome ◇ **nucleosome** ◇ **nukleozom** g. Elfenn gromatinel greunek o c'hoarvezout eus un tammad DNA ennañ e-tro 200 daouad bazennoù hag 8 molekulenn histon.

nucléotide ◇ **nucleotide** ◇ **nukleotid** g. Korf o tisoc'h eus eradur ur vazenn burek pe pirimidek (oc'h amparañ un nukleozid) gant ur molekul trenkenn fosforek; ar molekul *n.* zo anezhañ unvez kentael an drenkenn dezoksiribonukleek (DNA); eradur 4 molekul *n.* a ya d'ober un drenkenn nukleek, ha houmañ dre gediañ gant ur protein a furn un nukleoprotein (sl. *désoxyribonucleïque*: *acide* ~).

nucleides, nucléides ◇ **nucleides** ◇ **nukleid** s. & g., **nuklid** s. & g. Anvad genadel an derc'hanoù; naouus eo an nuklid dre niver ar proton, *Z*, ha niver an neutron, sammad an daou niver o vezañ arouezet *A* (niver tolz); e tro 1 200 nuklid a eriñver, 900 anezho o vezañ skinoberiek.

(-)*nuclé-*

• *acide ribonucleïque* trenkenn ribonukleek • *acides nucléiques* trenkennoù nukleek • *anuclée* digraoñell • *attaque nucléaire* argad derc'hanel • *cataracte nucléaire* ferennlug a-graoñell • *cellules nucléées* kelligoù kraoñellek • *chaîne de nucléotides* arrevell nukleotidoù • *division nucléaire* emrannañ ar graoñell • *énucléation* ezklorrennañ • *fission nucléaire* skirriañ derc'hanel • *ictère nucléaire* ikter gronnel • *imagerie nucléaire* derc'hanwerañ • *le nucléide Y est créé dans un état excité* ganet e vez an nukleid *Y* er stad argrid • *macronucléus* makronukleüz • *médecin nuclé-ariste* mezeg derc'hanour • *médecine nucléaire* mezekniezh derc'hanel • *membrane nucléaire* koc'henn ar graoñell • *micronucléus* mikronukleüz • *mononucléaire* anhoskek • *mononucléaires* mononuklear • *mononucléé* unkraoñellek • *mononuclé-ose* mononukleoz • *multinucléé, polynucléé* lieskroañellek • *nucléosides-triphos-phates* nukleozidoù trifosfat • *ophthalmoplégie nucléaire, internucléaire* lagadseizi gronnel, etregronnel • *polynucléaires* polinuklear • *pronucléus femelle* pronukleüz benevel • *radiothérapie nucléaire, nucléothérapie* derc'hangurañ, skinobergurañ • *résonance magnétique nucléaire* dason gwarellec derc'hanel • *sexe chromosomique* pe *nucléaire* pe • *caryotypique féminin* rev c'henrizhel benevel • *trois modes d'altération nucléaire* tri mod displeberañ ar graoñell.

nullipare ◇ **1 nulliparous** aa., **2 nullipara** b. ◇ **anganerez** aa. & b. 1 A-zivout ur vaouez n'he deus ket bet bugale. 2 Maouez n'he deus ket bet bugale (sl. *-geste, -pare*).

NOTENN : Kinnig a ran renkañ Br. *anganerez* e rumm an adanvioù o tegemer merk ar benel, e-kichen *brazez, dougerez*, h.a. (sl. HMSB § 30, YBRB § 512).

numération globale, hématimétrie ◇ **blood count** ◇ **gwaderiñvañ** Savelañ niver an hemati, al leukokit hag ar pladanoù dre mm³ gwad.

numulaire ◇ **numular** ◇ **moneizek** aa. A-zivout ur skopad dezhañ neuz ur pezh moneiz (sl. *crachat*).

nutation ◇ **nutation** ◇ **nugañ** Horjellañ ar penn.

nutraceutique ◇ **pharmafoods, nutraceuticals** ◇ **magliaerezh** g. Diskiblezh o plediñ gant arver ar magliaoù (sl. *aliment, prébiotique, probiotique*).

nutriment ◇ **nutriment** ◇ **maguzenn** b. Nep danvezenn vevel pe anvevel oc'h enteñ war eeun hag en he fezh er bevedeg, hep bezañ daskemmet gant ar c'hoazhadur, e se a c'haller ebarzhiñ dre ensinklañ er wazienn, sk. : ar glukoz, an amindrenkennoù (sl. *aliment*).

nutripombe ◇ **nutripomp** ◇ **nutripomp** g. Pomp tredan arveret en defraouerezh, amkanet da ensinklañ boued liñvel pe damliñvel er stomok.

nutrition ◇ **nutrition** ◇ **1 mezhur** g. **2 Mezhuroniezh** b. **3 mezhurouriezh** b. 1 Teskad an argerzhioù o c'hoarvezout er bevedeg e-keñver evurñ ha danveziñ boued. 2 Studi ar bouedoù, o ferzhioù hag argerzhioù o zreuzfurm-idigezh gant ar bevedeg (sl. *diététicien, diététique*). 3 Arbennigiezh vezegel war anaezioù ar mezhur (diabet, borrdor, usvec'h kolesterol, angougemerioù bouedel, h.a.).

nutritionnel ◇ **nutritional** ◇ **1 mezhurel** aa. **2 mezhuroniell** aa. 1 A-zave d'ar mezhur. 2 A-zave d'ar Vezhuroniezh.

nutritionniste ◇ **nutritionist** ◇ **1 mezhuroniour** g. **2 mezhurour** g. 1 Imbourc'her war ar mezhur. 2 Mezeg arbennikaet war anaezioù ar mezhur.

NOTENN : Kemplezh eo domani embregourion ar mezhur ha daskenat hervez ar riezoù; dispis eo ar vevenn etre an embregoù hervez ma vezont kreizet war ar boued pe war ar mezhur; e se e tiforc'her *a*) ar *galvezourion* war ar *vouedouriezh* pe *bouedkalvezourion* (Gl. *techniciens en diététique*), anezho koskor ar c'heginoù bouedouriezh, *b*) an *uhelgalvezourion* war ar *vouedouriezh*, *bouedourion* ent strizh (Gl. *techniciens supérieurs en diététique, diététiciens*), o roll savelañ hanrennoù, diouzh ret diwar alioù ur mezeg, *c*) ar *vezhurourion* (sl. La-08 245 hh.).

(-)nutr-

• *aliment nutritif* boued magus • *cirrhose nutritionnelle* kirroz mezhurien • *d'origine nutritionnelle* a orin mezhurel • *dénutri* disvezhurek • *dénutrition, sous-nutrition* disvezhur, isvezhur • *échanges respiratoires et nutritifs* eskemmoù analadel ha mezhurel • *équilibre nutritif* kempouez mezhurel • *équilibre nutritionnel* kempouez mezhurel, keventel boued • *fonction nutritive* arc'hwel mezhur • *la fonction nutritive de la névroglie* arc'hwel mezhurel an neuroglia • *malnutrition* mivagañ, mivag • *pathogénie nutritionnelle de l'atrophie* ardarzh mezhurel an isvent • *troubles nutritionnels* strafuilhoù mezhurel.

nyctalopie ◇ **ability to see better in a dim light** ◇ **lemmwel g. issked** Galloud da welout en noz; doare ur gweled o vont war wellaat pa zigresk ar sked (sl. *adaptation à la lumière, adaptation à l'obscurité, cécité crépusculaire, cécité diurne, photopique, scotopique*).

NOTENN : Evezh : Sz. *nyctalopia* a dalvez kement ha *bouc'hwel issked*, Gl. *cécité crépusculaire, cécité nocturne*.

nyctéméral ◇ **nyctohemeral** ◇ **nozdeziat** aa. O padout 24 h, termen resisoc'h enta eget *trozeziat* (sl. *circadien*).

nycturie ◇ **nycturia** ◇ **nozuc'hod g. (troazh)** Troazhodiñ paotoc'h en noz, arouez voas eus ar skorted lounezh.

nymphomane ◇ **nymphomaniac** ◇ **1 darvari** aa., **blizvari** aa. **2 darvariadez b., blizvariadez b.** 1 Gant an darvar, ar blizvar. 2 Plac'h gant an darvar, ar blizvar.

nymphomanie, cœstromanie ◇ **nymphomania, uteromania** ◇ **darvar g., darvariadezh b., blizvar g. benevel** Gant ar merc'hed, c'hoant revel grizias, mac'hennec ha kendalc'hek (sl. *aphrodisie, hypersexualité, satyriasis*, La-07 88-90).

NOTENN : Dodenn arreadek er c'hedveno hag en arz (romanoù, filmoù), hennad eus ar vezekniezh henvoazel, ne zeu ket an aozerion gempred a-benn da savelañ an *darvar* evel anaez, ha pa ve dre verkañ ar vevenn etrezañ hag ar reolded pe, seul gent a se, dre zigej e arbennelezh. Test d'o amzivin eo liested an anvadoù lakaet warnañ en holl yezhoù (sk. : Sz. *hysteromania, metromania, andromania, gynecomania, clitoromania, furor uterinus, lascivia, uteromania*). An termenou brezhonek a ginnigan a denn o danvez, an eil eus ar stirann *dar* a gaver e Br. *dirik* (sl. ivez ar melladoù *anœstrus* hag *œstrus* er geriadur-mañ) hag eus al lostrann - *var* o taveñ d'an anaezioù mac'hennel (sl. *dipsomanie*), egile eus an termen *bliz* er ster bredelfennadel.

nymphotomie ◇ **nymphotomy** ◇ **muzellenbenañ, nimfotomiezh b.** Gouvenañ ul lodenn eus muzelloù bihan ar c'hourzh.

nystagmiforme ◇ **nystagmiform** ◇ **nistagmuzvanek** aa. Heñvel ouzh an nistagmuz, sk. : *stroñsadoù nistagmuzvanek* (Gl. *secousses nystagmiformes*).

nystagmographie ◇ **nystagmography** ◇ **nistagmuzwezañ** Lerc'hwezañ fiñvoù al lagad tizhet gant an nistagmuz (sl. *électronystagmographie*).

nystagmométrie ◇ **nystagmometry** ◇ **nistagmuzventañ** Muzuliañ heled an nistagmuz.

nystagmus ◇ **nystagmus** ◇ **nistagmuz g.** Fiñvoù luskellañ hag a-wechoù c'hwelañ ar voull lagad, anezho dilec'hiadoù andiarvenn, a-stroñs, a-zremm, a-zerc'h, hag a-wechoù a-gelc'htu; strafuilh ganedigel pe erzerc'hat d'un anaf er c'hreizennou nerval (sl. *myoclonique vélo-palatin : syndrome* ~, *vertige*).

nystagmus des mineurs ◇ **miners' nystagmus** ◇ **nistagmuz ar vengleuzierion** N. kiriek dezhañ an diouer gouloù, ar strivoù argeidañ, ar fiñvoù kensteudañ a-grec'hdu hag a-draoñdu, angemeret evel kleñved micherel (taolenn n° 23).

nystagmus optocinétique ◇ **optokinetic nystagmus** ◇ **nistagmus a-sellfiñv** Nistagmuz bonan an hinienn o sellout ouzh un heuliad ergorennoù o tremen a-dizh dirak e zaoulagad, o c'hoarvezout eus ur stroñsad gorrek eus al lagad o kantlenañ an ergorenn hag ur stroñsad distro herrek.

nystagmus retractorius ◇ **nystagmus retractorius** ◇ **nistagmus retractorius, nistagmuz a-saezh** Nistagmuz naoues dre stroñsadoù arreat o tidennañ ar voull lagad en ur enkaat faout ar malvennoù, diwar un anaf e golo ar c'hrennempenn en dro da zourbont an empenn, kevredet alies gant azoniad Parinaud (sl. *Parinaud : syndrome de* ~, *pédonculaires : syndromes* ~).

nystatine (DCI) ◇ **nystatin (INN)** ◇ **nistatin g. (DBE)** Danvezenn douhennet eus *streptomyces nourcei*, o piaouañ ur gwerc'h bevastaliñ galloudus ouzh ar govevion (*Candida albicans pergen*) (sl. *anti-fongique, dénomination commune internationale*).

O

Obermeier : spirilles ou **spirochètes d'~**, **Borrelia recurrentis** ◇ **Borrelia recurrentis** ◇ **Borrelia recurrentis**, spirill s. pe **spiroket** s. **Obermeier** Bakteri e stumm edañvennoù gwidilus, ganto fiñvoù troellennek, stadet ebarzh gwad gouziviaded an derzhienn arreadek bedvroat da geñver ar barroù (sl. *fièvre récurrente*).

obèse ◇ **obese** ◇ **1 borrr aa., borrek aa. 2 borreg g. -eion** Gouziviad ar borrdre.

obésité ◇ **obesity** ◇ **borrdre g.** Usteñv hollek a 'r gwiad behinel; berr e tisklerier un den adal ma tistremen eus 10 % ur pouez "reol" jedet a-gevreizh d'e savder; eus an hentennoù jediñ en arver eo reollun Lorenz an hini boazetañ (sl. *indice de masse corporelle*, *Lorenz : formule de ~*).

obésité androïde ◇ **android obesity** ◇ **borrdre gourevvanek** Borrdre muiek e parzh krec'h ar c'horf (brusk ha lodenn uhelañ ar c'horf); rouestlet e vez alies gant daralladoù talmerel hag a-wechoù gant an diabet lart (sl. *androïde, diabète sucré*).

obésité d'eau et de sel, syndrome hyperhydropexique, syndrome de Parhon ◇ **obesity with salt and water, Parhon syndrom** ◇ **borrdre dour ha holen, borrdre douruslenel, azoniad Parhon** Furm vorrdre o rouestlañ ar strafuilhoù miziaouel, muiek war ar c'hof, an divlez hag an divvorzhed, laurus, a-geñver gant an azdalc'h dour ha holen er gwiadoù; kevret gant lanvidigezh an amwiskadoù, kernadoù, gouvidegezh, a-wechoù distabiled ar gwrezverk; kiriek e ve dezhañ ur miarc'hwel a 'r c'hougorfenn hag an treuzempenn, peurgetket un usvorc'h hormon eneptraosheiat gant an drekgougorfenn (sl. *antidiurétique : hormone ~, turgescence*).

obésité génitale ◇ **hypogonad obesity** ◇ **borrdre isganadien** Borrdre o tarvezout da geñver an ezvezañs pe ar paouez eus an arc'hwelioù ganadel (sl. *eunuchisme, ménopause*).

obésité gynoïde ◇ **gynoid obesity** ◇ **borrdre benevvanek** Borrdre muiek e parzh traoñ ar c'horf : lodenn izelañ ar c'hof, peñsoù ha divvorzhed; nemedennek eo gantañ an daralladoù talmerel hag an diabet.

obésité insulinienne ◇ **hyperinsular obesity** ◇ **borrdre insulinien** Borrdre en ervez da zarvezout da heul ur prederiadur hirbad dre an insulin (sl. *hyperinsulinisme*).

obésité paradoxale avec rétention d'eau, obésité spongieuse, hydrolipopexie ◇ **hypoplasmic obesity** ◇ **borrdre diac'hinek gant dourzaldalc'h, dourlipidazdalc'h g.** Borrdre a stader, alies en desped d'ur reol voued strizh, gant merc'hed yaouank 'zo, muiek war ar c'hof, an divlez hag an divvorzhed, kevret gant strafuilhoù miziaouel : da bep prantad rakviziaouel e vuia ar borrdre; kiriek dezhañ e ve un direizhad eus ar c'hreizennoù gougorfenn-derc'hvel; dre ziounit progesteron, hormonou gourevel, douhennadoù skoedennel hag erskrivañ un hanren sec'h e tiraerz ur gwelladur argrenn (sl. *Mach : syndrome de ~, obésité d'eau et de sel*).

obésité thyroïdienne ◇ **hypothyroid obesity** ◇ **borrdre skoedennien** Borrdre kevret gant arouezioù miksedem.

objectal ◇ **objectal** ◇ **1 ~ergerc'henn, ergerc'hennel gaa. 2 ~ergerc'henn, ergerc'hennel aa.** 1 A-zave d'an ergerc'henn, sk. : *debarzh ergerc'henn* (Gl. *choix d'objet, choix objectal*), *annodadoù ergerc'hennel* (Gl. *investissements objectaux*). 2 Piauouel d'an ergerc'hennoù, a natur gant an ergerc'henn, sk. : *darempred ouzh ergerc'henn, darempred ergerc'hennel* (Gl. *relation d'objet, relation objectale*).

objectif ◇ **1 object, objective, aim 2 3 objective** ◇ **1 amkan g. 2 ergorel aa. 3 ergorek aa.** 1 Disoc'h merket d'un embreg. 2 A-zave d'an traoù enno o unan; a-zave d'an devoùdou stadet gant ar mezeg e unan (*azonoù ergorel*, Gl. *sympômes objectifs*), a-gevenep d'an devoùdou ditouret gant ar gouziviad (*azonoù dangorel*, Gl. *sympômes subjectifs*). 3 Gant an damant da zispartiañ pezh a denn d'an traoù sellet diouzh pezh a denn d'ar seller.

objet ◇ **object** ◇ **1 amkan 2 ergorenn b. 3 ergerc'henn b.** 1 (Gramadeg, Prederouriezh) pezh a zo troet outañ un ober, sk. : *klokaenn amkan, amkan un imbourc'h*. 2 (Prederouriezh) pezh a vez merzhet, derc'hennet, dezevet a-gevenep d'un ober merzhout, derc'hennañ, dezevout. 3 (Bredelfennerezh) pezh a glask al luzad diraez drezañ e bal, sk. : *ergerc'henn ar garantez*, Gl. *l'objet de l'amour*.

NOTENN : Ur geriadur a 'r vezekniezh a rank tremen gant un alberz eus ster an termennoù deveret diwar Gl. *objet*. Hiroc'h a

vo kavet e levrennoù ar steudad Lavar evit ar Brederouriezh, e GBLF §§ 823-828 evit ar Bredelfennerezh, e GRAMV evit ar C'hramadeg.

objet, object-

• *affection dont la cause a été objectivée* anaez bet ergorelaet e arbenn • *angle strabique objectif* korn loakriñ ergorel • *anomalie objectale* miergerc'h • *avoir pour objet (pulsionnel, affectif)* ergerc'hañ • *cacosmie objective* louvc'henoù • *désigner des objets intentionnels élémentaires* comme les émotions, l'humeur, la sensation de vivre arouezañ ambredadoù elfennel evel ar fromoù, an imor, ar santad bevañ • *l'attachement de la libido à des objets extérieurs* stagadur al libido ouzh ergerc'hennoù diavaez • *l'image de l'objet situé à l'infini se forme en avant de la rétine* kouezhañ a ra en araoek d'al luc'hsae skeudenn un ergorenn loet en trafell • *l'objectif du microscope* amkanell ar c'horrgrsker • *le recours à des données subjectives exigé par le regard objectif* an amoug a rezik ar sell ergorel digant roadennoù dangorel • *les objets tenus dans la main sont éprouvés comme moins lourds et moins volumineux* an traezoù dalc'het en dorn a andaler evel skañvoc'h ha bihanoc'h • *mettre en évidence, objectiver* arwelaat • *objectivable* ergoreladus • *objet contenant des substances radioactives* dafarenn a zo enni danvezennoù skinoberiek • *objet (pulsionnel, affectif)* ergerc'henn • *objet satisfaisant* ergerc'henn vozius • *objet (matériel)* traezenn • *préparer en vue d'un objectif* kempenn e sell d'un amkan • *recherche de l'objet par approximations successives* c'hwiliañ davit an ergorenn diwarbouez arnesadoù • *répétition involontaire et sans objet de gestes et de paroles* arren andiarvenn ha diamkan jestroù ha komzoù • *sphère de l'objet* ergor.

oblatif ◇ **oblatif** ◇ **haelidik** aa. (Bredelfennerezh) a-zivout un emzalc'h m'emañ douget ar gouzrec'h da emreiñ dre garantez diles (sl. *captatif*).

oblique antérieure droite : **position** ~ ◇ ◇ **loadur g. a-veskell war-raok dehou** Loadur amkanet da studiañ ar galon er skinouriezh : ur c'horn 45° etre ar bruskek hag ar skramm, ar skoaz dehou war-raok, an ezel krec'h kleiz savet.

oblique antérieure gauche : **position** ~ ◇ ◇ **loadur a-veskell war-raok kleiz** Loadur amkanet da studiañ ar galon er skinouriezh : ur c'horn 45° etre ar bruskek hag ar skramm, ar skoaz kleiz war-raok, an ezel krec'h dehou savet.

(-)oblitér-

• *artère calcifiée et parfois oblitérée* talmerenn razezekaet hag a-wechoù anforzhekaet • *artériopathie oblitérante* talmerennad anforzhus • *bronchiolite oblitérante* korrvronkefzo anforzhus • *canal normale oblitéré à la naissance* kanol o vont anforzhek ent reol d'ar c'hanedigezh • *cholangite diffuse non oblitérante* bestforzhfo strewek anstevius • *désoblitérer, désobstruer* disteviañ • *désoblitérer, rétablir la perméabilité (d'un vaisseau)* azforzhekaat • *fibrose des voies biliaires progressivement oblitérante* fibroz ar forzhioù bestl o tevoudañ tamm ha tamm an anvoll anezho • *oblitération d'un vaisseau* anforzh ur wazhiedenn • *oblitération fonctionnelle* anforzh arc'hwel • *oblitérer la cavité vaginale* direvoudañ kavenn ar gouin • *obstruction, oblitération* steviad, steviadur • *obstruer, (s')oblitérer, obturer, rendre étanche* anforzhañ, anforzhekaat • *rétrécissement ou oblitération d'une artère* isvoll pe anforzh un dalmerenn • *sténose, atrésie, oblitération* anvoll, andigor.

obnubilation ◇ **obnubilation** ◇ **koabrennegezh** b. Darallad an defroù gant morgud, morzidigezh arc'hwelioù ar bred, bec'h da zec'havaelañ ar plegennoù, derez kentañ an arluz.

Obrinsky : **syndrome d'~** ◇ **Obrinsky syndrome** ◇ **azoniad Obrinsky** Angwe hollet pe darnel speur ar c'hof, kevret gant kammneuziadoù troazhgandad (sl. *Parker : syndrome de ~*).

obscur-

• *adaptation à l'obscurité* argeskediñ diouzh an teñval • *affection de pathogénie obscure* anaez amsklaer e ardarzh • *anosognosie que l'on explique par l'absence de toute perception visuelle sans impression d'obscurité* nammandenouad a zispleger dre ezvezañs nep merzhad gwelede hep kantouezañ teñvalded • *ensemble disparate d'affections dont le seul point commun est l'obscurité de leur étiologie* teskad anaezioù daskevarall n'eus a voutin etrezo nemet amsklaerd o arbennelezh.

observance thérapeutique ◇ **patient compliance** ◇ **kefeuliañ ordrenel** A-berzh ar c'houziadiad, kemplegañ d'an erskrivadadoù mezegel.

observation médicale ◇ **case report** ◇ **arselladenn b. vezegel** Deskrivadenn skrivet un degouezh kleñvedel : an imboure'hiou klinikel hag amglinikel, ar prederiadurioù hag an dedro.

obsession ◇ **obsession** ◇ **mac'henn** b. Destrizh diabarzh, diwar ur c'henniñv bred, o c'hourlakaat d'ar gouziviad trivliadoù, mennozioù, realoù a oar int amoet hep gallout herzel outo ; azon pennañ an neuroz mac'hennel (sl. *compulsion, obsessionnelle : névrose ~*).

NOTENN : Heñvelster da Gl. *obsession* eo Gl. *compulsion*, nemet ez arverer heñval e-keñver ar realoù mac'hennel dreist holl (sl. *TOC, GBLF § 220*).

obsessionnelle : névrose ~ ◇ **obsessional neurosis** ◇ **neuroz g. mac'hennel** “Rumm neurozioù hiniennekaet gant Freud, a zo aet d'ober unan eus sternioù pennañ ar c'hlinik bredelfennad. Er furn rizhek, ez erzerc'h ar c'henniñv bred dre azonoù mac'hennel : derc'hadoù, mennadoù, realoù, kantaezadoù mac'hennel ; stourm ouzh ar fiñvennoù mac'hennel-se, lidoù argas, un dezeverezhet merket gant an daskiriadur soñjoù, an amzivin, ar skorpuloù, heudadur an deñvezout hag an ober” (GBFL § 810).

obstacle médical au permis d'inhumer ◇ ◇ **harz lezennevezegel ouzh an aotre beziañ** Skoilh ouzh kefleuniadur al lidoù diwezhañ en amvezadoù dibarek : marv arialek koulel pe gouselladoù, marv trumm, marv oc'h engwezhañ ur giriegezh ; en eneb, harz ebet ne vez disklriet goude ar marv naturel pe an emlazh divar (sl. *mort naturelle, m. subite, m. suspecte, m. violente*).

obstacle

• *distension de l'urètre par suite d'un obstacle à l'écoulement de l'urine* dardennañ ar c'han droazh, harzet diver an troazh gant ur skoilh • *faire obstacle à la circulation* skoilhañ an amred • *la membrane semi-perméable fait obstacle aux colloïdes* ar gennenn handreuz a gae ouzh ar c'holloïdoù • *secondaire à un obstacle à la circulation et à la résorption du liquide céphalorachidien* eilvedel d'ur skoilh ouzh amred hag assugard ar liñvenn benn-kein.

obstétrical ◇ **obstétrical** ◇ **1 amiegel aa. 2 gwilioudel aa.** 1 A-zave d'an Amiegouriezh. 2 A-zave d'ar gwiliouderezh.

obstétricien ◇ **obstetrician** ◇ **amiegour g. -ion** Mezeg arbennikaet war an Amiegouriezh.

obstétrique ◇ **obstetrics** ◇ **Amiegouriezh b.** Arbennigiezh vezegsurjanel o plediñ gant ar vec'hiegi hag ar gwilioud bonan ha kleñvedel.

NOTENN : Er c'haezeeg e vez arveret Br. *gwiliouder g.* (Gl. *accoucheur*) elec'h *amiegour*, ha da heul, Br. *gwilioudel aa., gwiliouderezh g.* e-lec'h *amiegel aa., amiegouriezh b.* (sl. *maïeuticien*, La-16 354-355).

obstruction ◇ **obstruction** ◇ **steviañ, steviadur g.** Gevennañ pe skoilhañ amred an danvezioù sonnel pe liñvel en ur gorzenn eus ar bevedeg.

(-)obstru-

• *bronchite chronique obstructive* skeventfo henek stevius • *désoblitérer, désobstruer* disteviañ • *hypoventilation pulmonaire obstructive* iswentadur ar skevent isaraezel pe steviadel • *obstruction, oblitération* steviad, steviadur • *obstruction du larynx* stankadur ar c'harloc'henn • *obstruer, obturer*, anforzhañ, anforzhekaat • *obstruction nasale, nez bouché* stankadur ar fri (sl. **(-)oblitér-, (-)occlu-**).

obten-

• *le froid obtenu par l'évaporation de CO₂ solide* ar yenion dec'honet dre ziaezhennañ CO₂ sonnel • *mboxpour obtenir une obstruction on cathétérise l'artère nourricière de la lésion* evit dewerc'hañ ur steviadur e kateterer talmerenn vagaan an anaf • *préparation pharmaceutique obtenue par stabilisation d'une plante fraîche* angevezh apotikel dewerc'het dre stabilaat ur blantenn fresk • *remplacement du sang d'un malade obtenu par une transfusion massive* amsaviñ gwad ur gouziviad dewerc'het dre ur treuzskuilhañ bloc'hel • *vaccin obtenu en inoculant le virus vaccinal dans l'épaisseur de la peau* vaksin de-c'honet dre enkoriñ ar viruz vaksinel e diabarzh ar c'hroc'henn end-eeun.

obturation ◇ **obturation** ◇ **1 dlidañ, dliderezh g. 2 barrañ, barridigezh b. 3 serrañ, serridigezh b., stankañ, stankadur g. 4 stankañ, stankadur** 1 Serrañ un igorenn c'hanediged pe darvoudel (stavn askornek) dre araez un ardivink (*dlider*, Gl. *obturateur*). 2 *B. un dant*, leuniañ kavenn un dant bruket gant un danvezenn amkanet d'he stankañ ha da zaskoriñ e galedet d'an dant (sl. *ciment dentaire*). 3 Klozadur reol un igorenn d'ur poent eus an diorreadur, sk. : *serrañ a ra ar san dalmerel da vare ar c'hanedigezh* (sl. *canal artériel*), pe lankad e ratreidigezh ur glozad, sk. : *stankañ ar bouc'h er gwazhied* (sl. *caillot : rétraction du ~*). 4 *S. ar pervez*, stouvadur ar pervez gant ur c'horf estren euvret pe ebarzhet dre ar youlc'h.

NOTENN : Da ouzhpennañ eo an termen korfadurel *toull steviet*, TA *foramen obturatum*, Gl. (kent PNA : Gl. *trou obturateur*) (sl. *foramen obturé*).

obtusion ◇ **obtusion** ◇ **bouc'hded b.** Leiadur eus lemmded ar meizerezh.

obtusisme mandibulaire ◇ **mandibular obtusism** ◇ **tougnded b. ar c'haved** Reñver digordet ar c'horn etre daou varr ar c'haved.

occipital, TA os occipitale ◇ **occipital bone** ◇ **askorn g. kilpenn** Askorn undañvat ha kreizer, loet e lodenn draoñ hag adreñv ar c'hlopenn; en e greiz emañ an *toull bras* (TA *foramen magnum*) ma tremen an hirvel ha *talmerennoù ar mellkein* (TA *arteriae vertebrales*).

occipital : syndrome ~ ◇ **occipital syndrome** ◇ **azoniad kilpennel** Teskad azonoù devoudet gant darallad an dolbezenn gilpenn, anezho strafuilhoù gweledel : peurgetket ledangwel diarez unsko hebiat d'ar vrizhenn ha, pa vez an anaf sezet a-gleiz, ur gwelandaenaod ha trezerc'hioù gweledel (sl. *cécité psychique, hallucination, hémianopsie*).

occipito-bregmatique ◇ **diamètre** ~ ◇ **occipitobregmatic diameter** ◇ **treuzkiz g. kilpenn-bregma** (Amiegouriezh) Treuzkiz penn ar grouell etre ar c'hilpenn hag ar bregma (poent kej etre an teir mellez a'r gurunenn, a-saezh hag a'n tal).

occipito-frontal : diamètre ~ ◇ **occipitofrontal diameter** ◇ **treuzkiz kilpenn-tal** (Amiegouriezh) Treuzkiz penn ar grouell etre an dorgenn gilpenn diavaez ha gwrizienn ar fri.

occipito-mentonnier : diamètre ~ ◇ **occipitomental diameter** ◇ **treuzkiz kilpenn-elgezh** (Amiegouriezh) Treuzkiz penn ar grouell etre an dorgenn gilpenn diavaez ha lodenn greiz izelañ an elgezh.

occlusal ◇ **morsal, occlusal** ◇ **~keharzañ, keharzel aa.** (Genawouriezh) A-geñver gant ar c'heharzañ; *talbenn keharzañ* pe *keharzel* (Gl. *face occlusale*) a reer eus gorre an dant, aleze an talbenn anezhañ o vont a-stok ouzh an dant keñverek, e arc'hwel breviñ ar boued, alese e anvad all : *talbenn frikañ* (Gl. *face triturante*).

1 occlusion¹ 2 occlusion, articulé dentaire ◇ **1 occlusion 2 occlusion, dental articulation** ◇ **1 keharzañ 2 keharz g., keharzadur g.** 1 Degas an dent traoñ a-stok ouzh an dent krec'h. 2 Keñver etre daou zant pe daou stroll dent krec'h ha traoñ pa vez serret an div aven (sl. *articulé dentaire, gnathologie, infraclusion, malocclusion*).

occlusion² ◇ **obstruction** ◇ **1 keharzañ 2 (-)dlita** (Surjianerezh) 1 Denesaat ribloù un digor naturel, ar malvennoù, an divveuz da skouer. 2 Keharzañ gwadek dre grafaelañ, sk. : *dlita ar malvennoù, malvenndlita*; en degouezh e ra ar galleg dreist holl gant al lostrann *-rraphie* (sl. *blépharorrhaphie*).

occlusion intestinale ◇ **ileus intestinal obstruction** ◇ **antreizh g. pervez** Anvad genadel an holl darvoudoù lemm a-geñver gant un anforzh arc'hwelel (nervel, foel, migennevidel) pe dreloc'hel (steviadur pe dagelladur) eus oaled ar pervez (ken ar vouzellenn voan, ken ar c'holon), oc'h astaliñ razh ha padus trehentadur an oulennoù hag an aezhennoù (sl. *iléus, invagination, volvulus*).

occlusion oculaire ◇ **blinded eye** ◇ **mouchañ lagad** Goleiñ ul lagad evit rediañ egile da "labourat" pa erc'hwilier ur bouc'hwel, un daouwel pe ur migenglot a 'l luc'hsaeoù (sl. *amblyopie, correspondance rétinienne, diplopie*).

(-)**occlu-**

• *bourrelets d'occlusion* erienoù keharzañ • *inoclusion palpébrale* ankeharz ar malvennoù • *muscle assurant l'occlusion de l'anus* kigenñ o terc'hel serr ar fraezh • *occlusion, atrésie, imperforation* andigor (un toull naturel), anvoll • *occlusion, oblitération* anforzh • *occlusion d'une ouverture naturelle, atrésie* andigor un toull naturel, anvoll • *occlusion temporaire de l'orifice buccal* stankañ padennek faout ar genoù • *occlusion volontaire des paupières* serridigezh diarvenn ar malvennoù • *provoquer l'occlusion fugace de la fente palpébrale* ober d'ar malvennoù serriñ ur predig • *subocclusion intestinale* gouantreizh pervez (sl. (-)**oblitér-**, (-)**obstru-**).

occup-

• *chacun des deux gènes occupant un locus identique sur chacun des deux chromosomes* pep hini eus an div c'henenn o c'henniñ ul lokuz kevelep war bep hini eus an daou gromozom • *intestin et péritoine occupant la hernie* pervez hag ampeleñn o c'henniñ un ogad • *masse de substance nerveuse occupant la plus grande partie de la fosse postérieure du crâne* bloc'h danvezenn nervel o c'henniñ an darn vrasañ eus poull adreñv ar c'hlopenn • *mesures climatiques, diététiques et occupationnelles* teskad an diarbennoù hinvael, mezhurel ha breadel • *pustule de grande taille occupant toute la hauteur de l'épiderme* burbuenn ventek o c'houzalc'h sav a-bezh an ezkroc'henn.

ochronose ◇ **ochronosis** ◇ **okronoz g.** Anaez dibaot kenan, erzerc'had eus an droazhalkaptonegezh, naouus dre ul livrezh gell-louet pe du er migern, er stirenoù hag e lec'hiennoù 'zo evel al lersae, an divskouarn hag ar fri.

octane ~ ◇ **octan fever** ◇ **terzhienn eizhvedek** Terzhienn spanaus, dezhi un drovezh eizh devezh, ur barr o tarvezout bep eizhvet deiz.

oculariste ◇ **ocularist** ◇ **lagadosodour g. -ion** Oberier pezhioù lagadosodel (sl. *prothèse*).

oculogyre ◇ **oculogyric** ◇ **1 ~lagadc'hwelañ, lagadc'hweler aa. & g. -ioù 2 lagadc'hwel, lagadc'hweladel aa.** 1 Termenoù stroll arveret evit aroueziañ ar c'hreizennoù, an nervennoù hag ar c'higennoù oc'h ober d'an daoulagad treiñ a-gevte hervez tri ahel an egor. 2 *Barr I*. (Gl. *crise o.*), andag ar c'higennoù lagadc'hwelañ o festañ ar boullou lagad diouzh un durc'hadur savelet, peurliesañ war grec'h (*barr krec'hsteudañ*, Gl. *crise de plafonnement, anoblepsie*), anadenn a stader e-kerz furmoù hirbad an empenno daeruziat (sl. *dextrogyre, encéphalite épidémique [...], Foville : syndromes de ~, lévogyre*, La-18 249-251).

oculomoteur ◇ **oculomotor** ◇ **~loc'hañ al lagad, ~lagadloc'hadel aa.** A-zave da fiñvoù an daoulagad; *nervenn loc'hañ al lagad*, TA *nervus oculomotorius*, anvad bremañ an trede daoudañv a-glopenn (a raed Gl. *nerf moteur oculaire commun* kent an destladurioù PNA ha TA), o nervaouiñ holl gigennoù ar poull lagad nemet ar gigenn veskellek uhelañ hag ar gigenn eeun kostezel (sl. *nerfs crâniens*).

1 ocytocine 2 ocytocine, oxytocine ◇ **oxytocin** ◇ **1 okitokin g. 2 oksitokin g.** 1 Hormon polipeptidek (nonapeptid) borc'hent gant gronnoù lez-kambr hag us-gweled ar gouzerc'hvel ha kadavet en drekgougorfenn; kentraouiñ a ra argrezadurioù ar grozh da geñver ar gwilioud ha kevaraezañ borc'herezh al laezh. 2 Nonapeptid korvellek kevanaozel, leteñvelluniad ouzh an hormon naturel, diounezet en amiegouriezh evit kentraouiñ argrezadurioù ar grozh.

NOTENN : Chom a ra da zivizout ha dalc'het e vo, evel e galleg, bep a dermen evit ar furmoù naturel ha kevanaozel pe, evel e saozneg, eeunaet an deandavur ha lakaet an un termen, Br. *oksitokin*, war an div furn, naturel ha kevanaozel.

ocytocique, oxytocique ◇ **ocytocic, oxytocic** ◇ **gwilioudoger aa. & g.** O hastañ ar gwilioud.

Oddi : sphincter d'Oddi, TA sphincter ampullae hepatopancreaticae ◇ **Oddi's muscle** ◇ **kelc'hstrishaer g. ar gloestr avu-ilgreiz** Kigenñ walennek en-dro da zibenn boutin ar san vestl ha san an ilgreiz.

NOTENN : Daoust ma anver bremañ an organ end-eeun gant termen an TA, e talvez bepred anvenn *Oddi* da luniañ deveradoù : *odiad, odifo*, h.a.

oddipathie ◇ **odiad g.** Anvad genadel anaezioù kelc'hstrishaer ar gloestr avu-ilgreiz : yoc'hennoù (ampullom), bogodoù, erwezhoù ouzh kleñvedoù an ilgreiz, an daouzegenn, ar forzhioù bestl (grouanegezh), en ervez da strafuilhañ an arc'hwelerezh anezhañ, devoudañ tanijenoù, steviadur pe skleroz isvillus.

oddite ◇ **odditis** ◇ **odifo g.** Tanijenn kelc'hstrishaer ar gloestr avu-ilgreiz.

odontalgie ◇ **odontalgia** ◇ **dentost b.** Laur klevet en dent, en un dant.

odontoblastes ◇ **odontoblastes** ◇ **odontoblast s.** Kelligoù a orin mezenkimatus evodet eus trobarzh ar vegenn dentel a-stok ouzh an adamantoblast, o vorc'hañ an dentin (sl. *adamantoblastes, dentine*).

odontocie ◇ **odontocia** ◇ **dentheuz g.** Leiad kantalc'h an dent diwar dirazekaat o kevaraezañ ar brukañ (sl. *carie*).

odontogènese, odontogénie ◇ **odontogeny** ◇ **dentparañ** (Rizhelloniezh) heuliad an anadennoù adalek furmiñ ar *bolc'h-ennoù dent* (Gl. *follicules dentaires*) betek *nodiñ an dent* (Gl. *éruption dentaire*) (sl. *éruption* 2).

NOTENN : Br. *dentparañ* a ginnigan ar verañ evit an un anadennoù e diarsell ar Veedouriezh hag ar C'hlinik (Sl. *dentition*).

odontoïde : **apophyse** ~, **TA dens (axis)** ◇ **odontoid process or peg, dens** ◇ **dant (ar velleñn ahel)** Baleg eus an eil mellenn c'houzoug (*mellenn ahel*, TA *axis*), kenvellet gant ar velleñn gentañ (*mellenn varc'h*, TA *atlas*).

odontologie ◇ **odontology** ◇ **Dentoniezh** b. Skiant o plediñ gant an dent hag o c'hleñvedoù.

NOTENN : Arveret e vez a-wechoù Gl. *odontologie* evel kenster da *art dentaire* ha graet *odontologistes* eus embregourion an *dentouriezh*; ent kefridiel e teanver *chirurgiens dentistes* an *dentourion* hag *odontologues* an *dentoniourion* (sl. *art dentaire*).

odontome ◇ **odontoma** ◇ **odontom** g. Anvad bet roet gant Broca da yoc'h ennoù dentel evodet hervezañ diouz ar gwiaid kenglenel; o renkañ a reer hiziv e-touez an *dentomou* (Gl. *dentomes*), yoc'h ennoù kuñv, dezho gwiaidur reol an dant oadour.

odontorragie ◇ **odontorrhagia** ◇ **dentwadliñv** g. Gwadliñv da heul digewanañ dent.

odynophagie ◇ **odynophagia** ◇ **gwalonk** g. Laur o lonkañ (termen arveret alies evel kenster da *brelonk*, Gl. *dysphagie*).

œdémateuse du sevrage : **maladie** ~ ◇ ◇ **kleñved gouliñvel an dizonadur** Anaez a stader e Norzh Afrika (J. Delon, 1950, Casablanca) en hañv hag en diskaramzer gant ar vagadelled nevezdizonet, naous dre an darc'hoal, ur beradur a 'r fri, un treutadur muiek, heuliet gant ur gouliñv, an andrafted, anafoù kroc'hen hag un dedro marvus herrek; hañvalout a ra bezañ un dianlenad d'an nevez protid (sl. *kwashiorkor*).

1 œdémateux, œdématié **2 œdémateux** ◇ **oedematou** ◇ **1 gouliñvek** aa. **2 gouliñvel** aa. 1 Gant ar gouliñv. 2 A-zave d'ar gouliñv.

œdémateux : **syndrome** ~, **syndrome de rétention hydrosaline** ou **de rétention hydrosalée** ou **hydrosodique** ◇ **oedematous syndrome** ◇ **azoniad gouliñvel, azoniad azdalc'h dourholenel pe dour-natriom** Teskad an anadennoù devoudet gant azdalc'h an dour hag an holen, anezho ensiladur hollek ar gwiaoù (gouliñvoù trobarzh), strafuilhoù analadel (gouliñv ar c'harloc'henn hag ar skevent, bruskdourad), direizhoù koazhadel (c'hweladoù, darc'hoal), tizhadoù nerval (klopennad, eklampsiezh, koma), azoniad a stader el lounezhadoù lemm ha henek pergen (sl. *hyperhydratation extracellulaire* : *syndrome d'~*).

œdème ◇ **oedema, SzAm. edema** ◇ **gouliñv** g. Ensiladur levrus ar gwiaoù, peurgetket gwiaid kenglenel ar goloadoù; e par ar c'hroc'hen ez anad ar g. e rezh ur c'hoefvadur dilaur ha hep ruzder, o terc'hel enlouc'h ar biz (pukad); e par ar flugez e teskriver lies azoniad oc'h entañ ar gouliñv, sk. : g. *ar skevent* (Gl. *œ. pulmonaire*); ur g. hollek eo an *anazark* (sl. *anasarque*).

œdème cellitique des membres inférieurs ◇ **rhumatismal œdema** ◇ **gouliñv remmel an izili traoñ** Gouliñv kalet oc'h ensilañ ar rannbarzh us-ufern ha talbenn kein an troad o tarvezout gant arzfoeion goude ur regas kigennel pe un daraez.

œdème malin ◇ **malignant anthrax œdema** ◇ **gouliñv yud a 'r serk** Darvoud deroù dibaot ar serk, o sezañ peurliesañ er malvennoù, a-wechoù en dremm, er bruched pe er vrec'h; brasaat a ra herrek ha mont kalet, aloubet e vez ar c'hroc'hen gant filboc'h ennoù o fregañ en ur leuskel ul liñvenn wadek hag o lezel war o lerc'h eskaroù leteñvel ouzh re ar *vurbuenn yud* (sl. *charbon, pustule maligne*).

œdème post-traumatique ◇ ◇ **gouliñv diandaraez** Gouliñv kalet kevret gant laurioù, andrafted, uswrez alies, kaheristeñv o tarvezout herrek goude un daraez, a ve a-geñver gant strafuilhoù damougek en nervreizhiad simpatek.

œdème par carence ou **de dénutrition** ◇ **nutritional œdema** ◇ **gouliñv mezhurel pe negezel** Gouliñv hollek gant pe hep fennadoù el levrgennoù a stader er prantadoù dienez gant an dud diret d'un hanren digempouez ha diouerek ennañ ar c'hig hag an druzennoù; kevredet e vez gant eldroazh, treutadur, gwanded hollek, istead kalon, amwad, usvec'h muiek an dour hag isvec'h ar protidoù er gwad; anaez hemañ a reuzias a-vloc'h er c'hampou prizonidi ha hangasidi da vare an eil Brezel bed.

œdème printanier pulmonaire anaphylactique, bronchite allergique printanière ◇ ◇ **gouliñv skevent darwalladel a 'r gwianten, bronkefzo g. allergek a 'r gwianten** Anaez a stader en nevezamzer, naous dre un trec'hwezh, ur skrouediañ albuminek liv orañjez, un eleozinofil muiek er gwad, nivlennoù liesneuz hesteuz war skinlunioù ar skevent; kiriek dezhañ eo ar c'hizidikaat ouzh pollen al lugustr hag al lore (sl. *Löffler* : *syndrome de ~*).

œdème pulmonaire ◇ **pulmonary œdema** ◇ **gouliñv skevent** Ensiladur levrus ar skevent; kemm a lakaer etre *a*) ar g. *s. kalonien* (Gl. *o.p. cardiogénique*) o tarvezout dre ur wikefre wadloc'honiell (falladur ar galon gleiz o tec'han un uswask e korrwazhied ar skevent); *b*) ar g. *s. anafel* (Gl. *o.p. lésionnel*) dre zarallad ar speur logigoù-korrwazhied (e-kerz skeventadoù diseurt : pœrel, pistriel, h.a.); hervez an dedro e vez ar g. *s.* pe lemm (*GSL*, Gl. *œdème aigu pulmonaire, OAP*), goulemm pe henek (sl. *détresse respiratoire de l'adulte, insuffisance cardiaque, membranes hyalines* : *maladie pe syndrome des ~, poumon de choc*).

œdipe : **complexe d'~** ~ ◇ **Oedipus complex** ◇ **kemplezh** b. **Edip** (Bredelfennerezh) Emzalc'h reol ar bugel etre 3 ha 5 bloaz, orget ouzh e gar allrev ha galen ouzh e gar kenrev, anezhañ hervez Freud ar skoulm a zo en e zalc'h an diorreadur bredrevel a-bezh (sl. GBLF § 212).

œdipisme ◇ **oedipism** ◇ **edipaot** Seurtad emvturniañ, anezhañ ezklorennañ ar voull lagad an unan.

œil ◇ **eye** ◇ **lagad** g. Organ ar gweled loet er poull lagad, anezhañ ar voull hag an nervenn weled.

œil de chat amaurotique ◇ **cat's eye amaurosis** ◇ **steuzwel** g. **lagad kazh** Dallder untu kevret gant un adsked gwenn azglas war ar mab lagad, stadet er retinoblastom (sl. *leucocorie, rétinoblastome*).

- œil directeur** ◇ **dominant eye** ◇ **lagad stur** Lagad trec'h er sellout reol, an hini a reer gantañ pa vuker da skouer.
- œil fixateur** ◇ **fixating eye** ◇ **lagad steuder** El loakrerezh, an hini eus an daoulagad durc'haet etrezek an ergorenn (sl. *fixation oculaire*).
- œil sympathisant** ◇ **sympathizing eye** ◇ **lagad truezer** An hini eus an daoulagad, bonan da gantañ, tizhet a eil lank gant al lagadfo truezadel (sl. *ophthalmie sympathique*).
- œil sympathisé** ◇ ◇ **lagad truezet** An hini eus an daoulagad, tizhet da gantañ gant al lagadfo truezadel (sl. *ophthalmie sympathique*).
- œil-de-perdrix** ◇ **soft clavus** ◇ **beskarn g.**, **lagadenn b.** **yar** Tevadur kornhaen an ezkroc'hen o sezañ peurliesañ war ribl diabarzh ar 5t biz troad a-dal d'un hiperkeratoz war ribl diavaez ar 4e biz.
- œnolature**, **œnolé** ◇ ◇ **gwinatur g.**, **gwinleizhad g.** Angevezh a c'hoarvez e ambrougenn eus gwin; aozerion 'zo a laka kemm etre Gl. *œnolé* (Br. *gwinleizhad*), ma vez dileizhet an danvezenn wezhus er gwin, ha Gl. *œnolature* (Br. *gwinatur*), ma vez meizhiet struzhennoù er gwin (sl. *alcoolat*, *alcooolature*, *alcooolé*).
- œnolisme** ◇ ◇ **enolegezh b.** Furm eus an alkoolegezh diwar ar gwin, oc'h erzerc'hañ dre strafuilhoù koazhadel (*kirroz*) ha nervel (*nervennfo trobarzhel*, *alfo kren*) (sl. *cirrhose alcoolique*, *délire alcoolique aigu*, *polynérite*).
- œnomanie** ◇ **œnomania** ◇ **1 gwingaezh g.**, **gwingaezhiadezh b.** **2 alfo kren** 1 Estoue ouzh ar gwin. 2 Aozerion 'zo, saoznek pergen, a laka an termen war an alfo alkoole lemm (*addiction*, *délire alcoolique aigu*).
- œsocardigramme** ◇ **oesocardigram** ◇ **treizhergalonvarwezad g.** Kalonvarwezad dewerc'het dre an hent entreizherel; kalvezder arveret dreist holl evit erc'hwiliañ gwerederezh ar c'hentez kleiz, hemañ o vezañ loet e diastok an treizher.
- œsoduodénostomie**, **œsophagoduodénostomie** ◇ **oesophagoduodenostomy** ◇ **dasforzhañ treizherdaouzegenn** Skarvañ surjaniel an treizher ouzh an daouzegenn goude kreuzezvenañ hollel (sl. *anastomose*, *gastroctomie*).
- œsofibroscope**, **œsophagofibroscope** ◇ **oesophageal fibrescope** ◇ **ezofibroskop g.**, **ezofagofibroskop g.** Edañvengweler amkanet da erc'hwiliañ an treizher (sl. *fibroscope*).
- œsofibroscoapie** ◇ **oesophagoscopy with a fibrescope** ◇ **edañvengweliñ an treizher**, **treizheredañvengweliñ**, **ezofibroskopiñ** Hentenn erc'hwiliañ dre engweliñ diabarzh an treizher dre araez ur fibroskop.
- œsophage** ◇ **oesophagus**, SzAm. **esophagus** ◇ **treizher g.** Hanrann a 'r ganol vezhur o keneren ar c'hargadenn hag ar stomok.
- œsophagisme** ◇ **oesophagism** ◇ **treizherandag g.** Dargrezad dasstrizhek a 'n treizher o tevoudañ un isvoll enk pe enkok'h hep anaf heverk.
- œsophagite** ◇ **oesophagitis** ◇ **treizherfo g.** Tanienn lemm pe henek an treizher.
- œsophagocologastrostomie** ◇ **oesophagocologastrostomy** ◇ **kolonadforzhañ treizher-stomok** Dasforzhañ an treizher hag ar stomok dre zanveziñ ar c'holon treuz.
- œsophagogastrastomie**, **œsogastrastomie** ◇ **oesophagogastrastomy** ◇ **treizheradforzhañ er stomok** Gwezh surjaniel dewerc'het evit parraat ouzh isvoll an treizher, anezhañ dasforzhañ parzh krec'h, dreist isvoll, an treizher ha deun ar stomok desachet a-dreuz ur flañchadenn er gele'hspeurenn.
- œsophagojéjunostomie** ◇ **oesophagojéjunostomy** ◇ **dasforzhañ treizheryunegenn** Skarvañ surjaniel an treizher ouzh ar yunegenn goude ur c'hreuzezvenañ hollel pe e tro ur c'hankr andilamadus a 'r c'hardia.
- œsophagoplastie** ◇ **oesophagoplasty** ◇ **treizherateliñ** Oberatadenn amkanet da amsaviñ un tamm bras pe vrasoc'h eus an treizher anforzhekaet, dre dreuzplantañ pe un erlamad kroc'hen, pe ul lodenn stomok, yunegenn pe kolon.
- œsophagorragie** ◇ **oesophageal haemorrhage** ◇ **treizherwadliñ g.** Gwadliñ diwar glaourgenn an treizher.
- œsophagoscopie** ◇ **oesophagoscopy** ◇ **treizherengweliñ** Erc'hwiliañ an treizher dre araez ar fibroskop (sl. *œsofibroscoapie*).
- œsophagostomie** ◇ **oesophagostomy** ◇ **treizherezforzhañ** Dewerc'hañ un digor etre an treizher hag ar c'hroc'hen.
- œsophagotomie** ◇ **oesophagotomy** ◇ **treizherenbenañ** Digeriñ surjaniel kanol an treizher.
- œstradiol** ◇ **oestradiol** ◇ **estradiol g.** Hormon naturel borc'het gant ar vierrez, nes ent kimiek d'an estron ha kalz gwezhusoc'h egetañ; e zoughenniñ a reer eus ar vierrez hag eus an troazh.
- œstradiolémie** ◇ **oestradiolaemia** ◇ **estradiolwadvec'h g.** Feur an estradiol er gwad.
- œstral : cycle** ~ ◇ **oestrous cycle** ◇ **dargor g.** Kemalad trovezhiek daskemmadoù ar grozh hag ar gouin delanket gant borc'hadennoù ar vierrez e raklen d'ar frouezhigiñ ha d'ar vec'hiegi, anezho *a*) ul lankad follikulinel, ar *rakdarvezh* (Gl. *præœstrus*), *b*) an *darvezh* (Gl. *œstrus*), lankad ar vic'hadiñ hag an amzer ma c'hell darvezout ar frouezhigiñ, *c*) ul lankad follikuloluteinel, an *diandarvezh* (Gl. *postœstrus* pe *métœstrus*), lankad an eraozañ d'ar vec'hiegi pe an distro d'an ehan, hag en dro-mañ : *d*) al lankad diwezhañ, an *etredarvezh* (Gl. *diœstrus* pe *interœstrus*) (sl. *anœstrus*, *menstruel : cycle* ~, *ovarien : cycle* ~).
- œstranediol** ◇ **oestraneol** ◇ **estraneol g.** Hormon benevel douhennet eus an troazh.
- œstriol** ◇ **oestriol** ◇ **estriol g.** Hormon torzhiennel douhennet eus troazh ar beneved bec'hiek.

- œstrogène** ◇ **1 oestrogenous 2 oestrogen** ◇ **1 estrogen** aa. **2 estrogen** g. -où & -eier 1 O telankañ an dar. 2 Danvezenn o telankañ an dar.
- œstrogènes** : **hormones** ~ ◇ **natural oestrogens** ◇ **hormonoù** l. (g.) **estrogen** Stroll hormonoù douhennet eus ar bolc'hennoù vierrez ha dreist holl eus an dedaoladoù naturel evel an troazh, anezho : estron, estriol, estradiol, ekilenin, ekilin, 17-dihidroekilenin, estrandiol A ha B; kevanaozañ a reer an estron hag an estradiol, hag ivez ur steudad korfoù kevarall ent kimiek, ganto avat perzhioù leteñvel ouzh re an estron (sl. *follicule de De Graaf*).
- œstrogénie** ◇ **œstrogeny** ◇ **estrogenegezh** b. Bezañs hormonoù estrogen er bevedeg.
- œstrogénothérapie** ◇ **oestrogenous therapy** ◇ **estrogengurañ** Mezegadur dre an estrogenoù naturel (hormonù) pe an aozadoù kevanaozañ leteñvel o ferzhioù.
- œstrus** ◇ **oestrus** ◇ **1 dar** g. **2 darvezh** g. Teskad an anadennoù hormonal kempred gant ar vic'hadiñ. 2 Padvezh an dar.
- 1 œuf, ovule 2 œuf, zygote 3 œuf, conceptus** ◇ **1 egg 2 egg, zygote 3 egg, conceptus** ◇ **1 vi g., vigellig b. 2 vi, vi speriet 3 vi, bec'hiegad** g. 1 Vi gwerc'h. 2 Vi goude uniañ an daou gamet gourev ha benev (sl. *fécon-dation*). 3 Endalc'had ar grozh vec'hiek (sl. *conceptus*).
- official** ◇ **officinal** ◇ **liavonnegel** aa. A-zivout an angevezhioù apotikel aozet diwar wehentoù *Bonég al liaoù*, pe *bonangevezhioù* (Gl. *préparation officinale*) (sl. *Codex, médicament offici-nal, pharmacopée*).
- Ofugi** : **maladie d'~** ◇ **Ofugi disease** ◇ **kleñved Ofugi** Anez dianav e orin naoues ent klinikel dre un dispuilhad krugennburbennoù o taskantañ e rezh plakadoù war ar fas, o trediñ a-fragadoù e-doug ur pemzektez, kevredet gant ur gwadeleozinofil hag un ensiladur eozinofil en derm.
- Ogilvie** : **syndrome d'~** ◇ **Ogilvie syndrome** ◇ **azoniad Ogilvie** Azoniad kofel lemm oc'h ober gousellout ur steviadur a 'r pervez, o tarvezout e diouer nep skoilh treloc'hel, a c'houlakaer kiriek dezhañ tizhadur ar forzhioù nervstruzhel, eilvedel e unan d'un anaf drek-ampelenn hanweel pe get.
- Oguchi** : **maladie d'~** ◇ **Oguchi disease** ◇ **kleñved Oguchi** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod enkilek aotozomek, seurtad bouc'hwel amheol bet deskrivet da gentañ e Japan; en ardizh ar gouloù e stader dre lagadsellerezh ul livrezh gwenn arlouet sourus er vrizhenn hag er vegenn, o steuziañ pa dremen ar gouziviñ un nebeut munodoù pe eurvezhioù en deñvalijenn, al luc'hsae o tistreiñ d'un neuz reol (anadenn Mizuo, 1914) (sl. *héméralopie*).
- oignon** ◇ **bunion** ◇ **bezoued** g. Yalc'h levrus tanijennek goloet gant derm hag epiderm tevaet evodet dindan amwask ar votez diwar kenvelloù an troad, dreist holl diwar genvell kreiztroad-oeñsoù ar biz bras, muiaet alies gant un ec'haskornenn eus penn ar c'hentañ askom kreiztroad (sl. *macroglossite* NOTENN, *œil-de-perdrix*).
- Oldfield** : **maladie d'~** ◇ **Oldfield disease** ◇ **kleñved Oldfield** Anez hêrezhel trec'hek naoues dre gevredet ur polipoz kolon-youlc'h ha kistoù soavel liesel.
- olécralgie** ◇ **olecranalgia** ◇ **kernilinos** b. Laur sezet war ar gem ilin, o tarvezout da heul ur regas a 'n arvrec'h pe daraezioù bihan o tec'han tanañ en amaskornenn.
- olécrâne, TA olecranon** ◇ **olecranon** ◇ **kern b. ilin** Bales bras a 'n helmo, kenvellet dre e dalbenn araok gant *poleenn ar paler* (TA *trochlea humeri*), oc'h amparañ, gant ar *baleg kurunek* (TA *processus coronoideus*), *ask a-boleenn an helmo* (TA *incisura trochlearis (ulna)*).
- oléome** ◇ **oleoma** ◇ **oleom** g. Nevezwe foel e dianlen sankadennoù eoul (eoul vazelin pergen).
- olfactif** : **syndrome** ~ ◇ ◇ **azoniad c'hweshael** Teskad azonoù devoudet gant ar yoc'hennoù empenn sezet a-us da lavnenn groueriek ar sileg : koll argammedek, untu ha daoudu, ar c'hweshael, isteñv gweledel daoudu, erfin strafuilhoù bred da heul amwask an dolbezenn dal.
- olfactive** : **syndrome de référence** ~ ◇ **olfactory reference syndrome, ORS** ◇ **azoniad angorzh c'hweshael** Seurtad mineuzarur (sl. *dysmorphophobie*), o vont eus an amgren da vlaziñ betek an dergoaliñ bezañ flærius; azoniad a ziforc'her diouzh ur psikoz trezerc'hadel : un neuroz arurel eo, oc'h angorzhañ ar c'hweshael evit amparañ e azon (sl. GBLF § 182).
- olfactifs** : **nerfs** ~, **TA nervi olfactori** ◇ **olfactory nerves** ◇ **nervennoù ar c'hweshael** Kentañ daoudañ a-glopenn.
- olfactométrie** ◇ **olfactometry** ◇ **c'hwezhverkañ, c'hwezhverkerezh** g. Muzuliañ bec'h izek un danvezenn en areaz da zec'han ur santad c'hweshael.
- oligoamnios** ◇ **oligoamnios** ◇ **amnionisliñv** g. Skorted liñvenn an amnion.
- oligoanurie** ◇ **oligoanuria** ◇ **damantroazh** g. Troazhisvorc'h eizhañ (sl. *oligurie*).
- oligoarthrite** ◇ **oligoarthrit** ◇ **nemeurarzfo** g. Tanijenn an arzoù o tizhout etre un ha pevar c'henvell.
- oligocranie** ◇ ◇ **klopennisvent** g. Skorted diorreadur ar c'hlopenn, re vihan hemañ a-geñfur gant mentoù all ar c'horf (leiadur ar c'heñver klopenn-korf, Gl. *rapport cranio-somatique*).
- oligocytémie** ◇ **oligocythaemia** ◇ **gwadolkelligoù** g. Isriñv ar c'helligoù gwenn ha ruz er gwad; o. *hémotoblastique* (termen dispredet), isriñv ar pladanoù, Br. *olpladanoù* (sl. *plaque, thrombopénie*).
- oligodendrocytes** ◇ **oligodendrocytes** ◇ **oligodendrokrit** s. Kelligoù a 'r makroglia, diouto astennadoù kitoplasm dibaot, bodet en dro d'an aksonoù e-barzh steuñvenn wenn an nerveg kreiz.

- oligodendrocytome, oligodendroglome** ◇ **oligodendroglioma** ◇ **oligodendroglom** g. Seurtad gliom en ervez d'un dedro yud a-wechoù, anezhañ kelligoù bihan arfont o c'hraoñell, oc'h evodiñ eus an dolbezenn gitem dreist holl.
- oligodipsie** ◇ **oligodipsia** ◇ **gousec'hed** g. Digresk pe ezvezañs hirbad a 'r sec'hed a stader gant tud 'zo hep na vez darallet o yec'hed (sl. *adipsie*).
- oligoélément** ◇ **trace element** ◇ **nemeurelfenn** g. Metal pe divetal (houarn, zink, kouevr, kobalt, krom, staen, manganéz, molibden, nikel, vanadium, silikiom, fluor, iod, seleniom) a zo andioueradus o bezañs, a gementadoù boc'hedel, er feurlod bouedell.
- oligohormonal** ◇ **hypohormonal** ◇ **ohormonel** aa. A-zivout un diouer hormon.
- oligoménonorrhée** ◇ **oligomenorrhoea** ◇ **mizistead** g. Leiadur talm ar mizioù.
- oligomimie** ◇ ◇ **olmeid** g. Argrennedd ar meidiñ (sl. *hypomimie*).
- oligonéphronie** ◇ **oligonephronia** ◇ **nefronisriñv** g. Leiadur niver an nefron.
- oligonucléotide** ◇ **oligonucleotide** ◇ **oligonukleotid** g. Polimer un degad nukleotidoù ouzh e ober.
- oligophagie** ◇ **oligophagia, anorexia** ◇ **olnaon** g., **oldebr** g. Leiadur an ilboued; aozerion 'zo a ra o. *psychonévrotique* eus an *disnaon* (sl. *anorexie, anorexie mentale, appétit, hyperphagie, polyphagie*).
- oligophrénie** ◇ **oligophrenia** ◇ **bredizilded** b. Termen hollek o venegiñ holl zereziou an dilerc'hegezh vred (sl. *arriération intellectuelle*), dispredet er vredvezekniezh, arveret c'hoazh evel kedrann en anvad kleñvedoù 'zo ma vez tizhet ar meizerezh (sl. an daou vellad da heul hag ivez *idiotie, idiotie amaurotique familiale, Marinesco-Sjögren : syndrome de ~*).
- oligophrénie phénylpyruvique** ◇ **phenylpyruvic oligophrenia** ◇ **bredizilded fenilpiruvek** Dilerc'hegezh vred hêrezhel, treuzkaset er mod enkilek, kevredet gant erzerc'hadoù navel (ustant, droukfell, fiñvoù koreoatetozek), daralladoù ar realezh (kefroù, orbidegezh, katatoniezh, fiñvadoù bloc'heiladek) hag un diouer livegadur a 'r faner; kiriek dezhi ur migennevid a 'r fenilalanin : hemañ, dre ziouer un enzym, ne vez ket treuzfurmet e tirozin, met dispennet e trenkenn fenilpurivek, daspugnet er gwad hag ezvennet dre an troazh; kleñved enzymatek diournet ent reizhiadek e Frañs; n'eus a brederiadur nemet mirout ur reol voued paour a fenilalanin betek an oad a 8 vloaz.
- oligophrénie polydystrophique** ◇ **polydystrophic oligophrenia** ◇ **bredizilded liesmideñvel** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod enkilek aotozomek, nes da gleñved Hurler (sl. *Hurler : maladie pe syndrome de ~*), diforc'h dioutañ dre rusted an disleberadur bred, oc'h anadiñ d'an oad a 2 pe 3 bloaz hag o tedreiñ d'an dilerc'hegezh don, dre un usvent avu muiek ha dre c'hougelled demerennoù ar gornsaes hag ezreolderioù an atel, kantet en eskern ar c'hloppenn, ar mellennoù hag al lestr, erfin dre droazhezvennadur paoterek ar mukopoli-sakaridozioù trenkek a rizek heparan-sulfat; o tedreiñ herrek d'ar marv.
- oligopnée** ◇ **oligopnoea** ◇ **olalan** g. Leiatac bloc'hel gwenterezh ar skevent, dezhañ lies arbenn bezus : tizhad navel, kigennel pe eskernel ar brusk, fennad krezoù muiek, borrdor bras; dec'han a ra ar c'harbouñvec'h (sl. *dyspnée, hypopnée, hypercapnie*).
- oligosaccharide** ◇ **oligosaccharide** ◇ **oligosakarid** Holozid o tisoc'h eus uniadur un niver bihan (etre 2 ha 4) molekul oz, berroc'h euta e volekul eget re ar polisakaridoù.
- oligosaccharidoses** ◇ **oligosaccharidoses** ◇ **oligosakaridozioù** l. (g.) Stroll kleñvedoù hêrezhel diwar un divgad enzymatek, naouus dre an ezvennañ troazhel padek oligosakaridoù : anezho ar mannozidoz, ar furozidoz, ar sialidozioù, hag anaezioù all nebeut anavezet; en o zaolenn glinikel e kaver an dilerc'h kreskiñ, kammneuziadoù ar fas, disleberadur ar bred, an avufelc'husvent, an distummadurioù eskern, al limfokit vakuolek, azonoù holl leteñvel ouzh re ar mukopolisakaridozioù, nemet gougeloc'h.
- oligosidérémie** ◇ **oligosideraemia** ◇ **gwadolhouarn** g. Amwad islivel o tarvezout gant ar vugale yaouank adalek 6 miz, diwar an negezh houarn; reol eo niver an hemati, nemet ez eo izel kenan feur an hemoglobine; parañ a ra gant ar mezegadur houarnel (sl. *anémie hypo-chrome, hyposidérémie, martial*).
- oligosonde** ◇ **oligonucleotide probe** ◇ **oligosont** g. Hillsont amparet gant ur c'hemalad oligonukleotid (sl. *sonde génétique*).
- oligospermie** ◇ **oligospermia** ◇ **olsper** g. Isriñv ar spergelligoù; parenn anfrouezhusted eo ur feur dindan 20 milion dre mL (sl. *aspermie*).
- oligothérapie** ◇ **oligotherapy** ◇ **nemeurelfenngurañ, nemeurgurañ** Prederiadur dre an nemeurelfennoù.
- oligotrichie** ◇ **oligotrichia** ◇ **olbriger** g. Amzioren ar gwaout, ar blev anezhañ o chom e stad un dumed tanav.
- oligurie** ◇ **oliguria** ◇ **troazhisvorc'h** g., **oltroazh** g. Leiadur ar c'hementad troazh; anv a reer eus *oltroazh* pa ziskenn an troazhisvorc'hañ dindan 500 mL/24 h, eus *damanthroazh* dindan 100 mL/24 h (sl. *anurie, anurie sécrétoire, oligoanurie*).
- Ollier** : **attelle pelvi-dorso-pédieuse** d'~ ◇ ◇ **astell lestr-kein-troad Ollier** Steudell blastret amkanet da brederiañ torroù is-trovaeg an askorn morzhed, anezhi ur savnell arloet ouzh talbenn araok-diabarzh an ezel traoñ, ouzh e ziloc'hekaat war astenn-pellaat; el laez, emañ ar savnell harp ouzh al lestr a-eiltu, en traoñ ez echu dre ur steug evit ar raog troad (sl. *appareil* 2).
- olympien** : **crâne ou front** ~ ◇ **olympian forehead** ◇ **kloppenn pe tal olimpel** Tal balirek, diorreet ezreol diouzh al led hag ar sav.
- omarthrose** ◇ **omarthrosis** ◇ **artroz** g. **skoaz-paler, omartroz** g. Artroz lec'hiet e kenvell ar paler.
- ombilic**, TA **umbilicus** ◇ **umbilicus** ◇ **begel** g. Kleizenn bukadek e kreiz speur ar c'hof, aspadenn eus enlenad ar funig vegell.
- ombilication** ◇ **umbilication, ombilication** ◇ **ampukañ, ampukad** g. Furmiñ ur vozig e-kreiz ur balir eus ar c'hroc'hen; a. *ar beg bronn* (Gl. o. *du mamelon*), didennadur eus rodenn ar beg bronn, hemañ o vezañ e kreiz ur meni kib ouzh e lakaat e-maez diraez ar vagadell.

- ombilico-portographie** ◇ **umbilical portography** ◇ **begelporzhluniñ** Porzhluniñ (sl. *portographie*) dewerc'het dre araez ur c'hateter ebarzhet dre wazhienn ar begel, dindan reoliñ skinselladel, goude diguzhañ ar stagell ront.
- ombilico-porto-scintigraphie** ◇ **umbilico-porto-scintigraphy** ◇ **begelporzhskingannluniñ** Skingannluniñ an avu hag e hanrannoù goude ensinklañ mikrosferoù tiellet gant un izotop skinoberiek er wazhienn borzh dre wazhienn ar begel.
- ombiliqué** ◇ **umbilicated, ombilicated** ◇ **ampukadec aa.** A-zivout ur balir eus ar c'hroc'hen a zo ur vozige en e greiz, sk. : *krugennoù ampukadec* (Gl. *papules ombiliquées*).
- Ombrédiante : opérations d'~** ◇ **Ombrédiante operations** ◇ **oberatadennoù Ombrédante** 1 Mod erougurañ an hipopadiaz, anezhañ dazluniañ ar c'han troazh diwar goust amwiskadoù ar c'halc'h loet a-is d'ar gwask hipospadec a zereener wardu ar vezenn. 2 KellAanlenañ treuzgousac'h (Gl. *orchidopexie trans-scrotale*) (sl. *orchidopexie*).
- Ombrédiante : procédé d'~** ◇ **araezad g. Ombrédiante** Hentenn brederiañ torrou trebez ar vugale, anezhi diloc'hekaat, diwar-bouez ur c'horfanroad, an ilin diskaset a-dreñv ar brusk, hag an arvrec'h, pleget aserzh, loet a-dreñv ar c'hein.
- ombrelle** ◇ **endlid g.** Trevnad anforzhañ ebarzhet e-kerz ur c'hateteriñ gwezhiadennel ha destignet pe e-barzh ur *san dalmerel dreistpadec* pe e-barzh ur gavenn galon dehou evit steviañ ur *c'hehented etre-kofigoù* pe, dreist holl, ur *c'hehented etrekentezoù*; disheñvel eo enta amkan an endlid diouzh hini ar sil engwazhiennel (sl. *filtre intraveineux cave*).
- omental** ◇ **omental** ◇ **danter, danterel aa.** A-zave d'an danter.
- omentectomie** ◇ **omentectomy** ◇ **danterezvenañ** Dazbidañ surjiañ ul lodenn bras pe vrasoc'h eus an danter.
- omoplate, TA scapula** ◇ **scapula** ◇ **plancken g. skoaz** Askorn plat ha tric'hornek kern d'an traoñ loet e talbenn adreñv ar skoaz; war e dalbenn adreñv emañ *spermen ar planken* (TA *spina scapulae*), an eizhaenn diavaez anezhi o furniñ ar *gern skoaz* (TA *acromion*); e korn diavaez ar planken emañ ar *bezel* (TA *cavitas glenoidalis*), kenvellet gant *penn ar paler* (TA *caput humeri*).
- omphalectomie** ◇ **omphalectomy** ◇ **begelezvenañ** Dazbidañ ar begel.
- omphalite** ◇ **omphalitis** ◇ **begelfo g.** Taniñenn ar begel.
- omphalocèle** ◇ **omphalocèle** ◇ **begelogaad g.** Avelenn a-vegel (Gl. *hernie ombilicale*).
- omphalorrhagie** ◇ **omphalorrhagia** ◇ **begelwadliñv g.** Gwadliñv dre ar begel.
- omphalotomie** ◇ **omphalotomy** ◇ **funigenbenañ** Skejañ funig ar begel.
- omphalotripsie** ◇ **omphalotripsy** ◇ **funigvreviñ** Frikañ ar funig veugel diwar-bouez ur c'hevel greñv (*funigvrevver*, Gl. *omphalotribe*), gwezh o lakaat diezhomm argoulmañ ar funig.
- onanisme** ◇ **onanism** ◇ **onanegezh** Dre zave d'an dudenn viblek Onan a gavas gwell "strewiñ e sper war an douar" eget reiñ bugale d'e c'hoareg Tamar bet gourlakaat dezhañ da wreg goude marv e vreur, e voe graet o., da gentañ eus ar *eventrac'h astalet* (Gl. *coït interrompu*), da c'houde ha betek hiziv eus embregoù renet gant tud eus an eil rev hag eben evit diraez an oriadell ermaez eus ar *eventrac'h* kefleun (sl. *masturbation*).
- Oncocerca volvulus** ◇ **Oncocerca volvulus** ◇ **Oncocerca volvulus** Arvevaded eus urzhad an Nematod, a vez o rizheloù, pe *mikrofilar* (sl. *microfilaires*) oc'h aloubiñ an derm, hag o furn oadour, neudennek, lies kentimetr hed, o tec'han yoc'hennou bihan endan-groc'hen.
- onchocercose** ◇ **onchocercosis** ◇ **onkokerkoz g.** Erialerezh gant ar filar *Onchocerca volvulus*, stadet paot en Afrika drovanel, e Kreizamerika, e Kolombia, e Venezuela, e Brazil hag e Yemen, naous dre *I*) yoc'hennou bihan endan-groc'hen, enno filar oadour blouezet (*onko-kerkomoù*, Gl. *onchocercoses*), sezet e par ar spermennoù klun, an trovelegoù, ar c'hestad, ar groazell, an daoulin hag a-wechoù ar c'hlopenn; 2) ensiladur an derm gant un niver bras rizheloù (*mikrofilar*), o tec'han erwezhoù foel strewek debronek kenan ha dispuihadoù krugennoù (*kravien filarel*, sl. *gale filarienne*) e par an izili, an dargreiz hag ar peñsoù, o tedreiñ etrezek al likenekaad hag an isteñv kroc'hen, an dilivegañ hag a-wechoù an elefantiaziz; 3) *alouberezh al lagad gant ar mikrofilar*, erzerc'had grevusañ ar c'hleñved, o tevoudañ kornsaefo, koraelenvezfo ha tolgennluc'hsaefo, raklen d'ur bouc'hwel amheol, un enkaat kengreiz a 'r gwelvaez hag un dallentez argammedek; a zen da zen e vez treuzkaset ar c'hleñved dre c'hwibu a 'r genad *simulium*, trezouger ar mikrofilar.
- oncocyte** ◇ **oncocytoma** ◇ **onkokitum g.** Yoc'henn, kuñv peurliesañ, a luniad gwagrennel (seurtad adenom), ouzh he ober kelligoù bras greunek hag eozinofil o frotoplasm (*onkokit*, Gl. *oncocy-tes*), sezet war ar skoedenn, ar bronkez, ar gwagrennoù halviñ, al lounezh.
- oncogène** ◇ **1 oncogenic** **2 oncogen** ◇ **1 hanweiat aa., onkogen aa. 2 genenn u. hanweiat, onkogenenn u.** 1 O tevoudañ un neridigezh hanweel (sl. *virus oncogène*). 2 Genenn o tasperzhañ e neridigezh ar c'helligoù hag en araez da zelankañ ur c'hankr (alese e anvad kaozeek : *genenn ar c'hankr*, Gl. *gène du cancer*); bezant reoù anezho er retroviruzoù (o. *viruzel v-onk*), re all e-barzh kelligoù loenel reol (o. *kelligel k-onk* pe *proto-onkogen*).
- oncographie** ◇ **oncography** ◇ **1 ec'honwezañ 2 ec'honwezad g.** 1 Lerc'hwezañ argemmadoù ec'honad ur c'horf, un organ dre araez un ec'honwezer (Gl. *oncographe*). 2 Lerc'hwezad dewerc'het dre araez un ec'honwezer.
- oncologie, cancérologie, carcinologie** ◇ **oncology** ◇ **1 yoc'hennoniezh, hanweoniezh 2 Hanweouriezh b., Kankroureiezh b.** 1 Studi ar yoc'hennou, an hanweoù. 2 Arbennigiezh vezegel o plediñ gant ar c'hankroù.

oncoprotéine ◇ **oncoprotein** ◇ **onkoprotein** *g.* Termen genadel oc'h erdalañ an onkogen hag an antionkogen (sl. *anti-oncogènes*).

oncornavirus ◇ **oncornaviruz** ◇ **onkornaviruz** Viruz onkogen gant RNA (sl. *rétrovirus, Oncovirinae, virus oncogène*).

oncose ◇ **oncosis, osteoblastic osteolysis** ◇ **onkoz** *g., askornloezañ osteoblastel* Argerzh deloezañ an askorn naouus dre un diveinelaat kevret gant un tizhad eus an osteokit (sl. *calcitonine, déminéralisation, ostéoblastes, ostéoclastes, ostéocytes, ostéolyse*).

oncostatique ◇ **oncostatic** ◇ **1 hanweharz** *aa.* **2 hanweharzer** *g. -ioù* 1 Oc'h astaliñ dedro ar yoc'hennoù hanweel. 2 Danvezenn hanweharz.

oncotique : pression ~ ◇ **oncotic pressure** ◇ **greñn** *g. kolloidel, gwask* *g. onkotek* Greñn gweredet gant ar c'holloidoid, peurgetket gant ar proteinoù.

onction ◇ **inunction** ◇ **eliañ, eliad** *g., eliadur* *g.* Arloañ un danvezenn druz ouzh ur parzh eus ar c'horf.

onde ◇ **wave** ◇ **gwagenn** *u.* 1 Anadenn froumel o treledañ, *sk. :* ar *stenwag* (Gl. *o. acoustiques* pe *sonores*), eus ar froumel treloc'hel etre 16 000 hag 20 000 Hz talm, ar *g. hertzel* (Gl. *o. hertziennes*), *g.* dredanwarel dreist 0,2 mm trohed. 2 Elfenn en ur c'hevregad tredanvarwezadel, *sk. :* *g. P* (Gl. *o. P*), o verkañ argrezad ar c'hentezoù, *g. war gouc'h* (sl. *onde en dôme*), *h.a., g. garotidresennel* (sl. *carotidogramme*), *sk. :* *g. anacrotek* (Gl. *o. anacrote*), uheladur al linenn askennus, arouez isvoll ar gwask aortek, *h.a.*

onde de choc ◇ **shock wave** ◇ **gwagenn edrur** Gwagenn wask pellennek dewerc'het dre araezadoù tredanliñvrenel, gwasktre-danel, tredanwarel, usstenioù (sl. *lithotritie*).

Ondine : malédiction d'~ ◇ **Ondine's curse** ◇ **milligadenn b. Ondin** (Ondin, evit kastizañ he gwaz, ur marvel anezhañ, a lamas digantañ ar galloud diarzoug da dennañ e anal, hag eñ mervel e ser emreiñ da gousket) azoniad naouus dre lankadoù istead analañ ha harzanal gant dulaz, morvor, skorted kalon dehou zoken; arouezioù an iswentadur skevent eo ar c'harboüsvec'h, an hipoksemiezh, an akidoz analadel digevassavet, endra vez reol prouadoù arc'hwelel an analañ; anaez, dibaot gant an oadourion, nemedennek gant ar vugale, o tedreiñ dre resmiadoù delanket gant ar poreadoù analadel pe gant mezegadurioù gevennus d'an analañ; furmoù kentael a stader, dizalc'h diouzh nep tizhadur nervel, kigennel pe analadel, a c'houlakaer an arbenn anezho e kreizennoù hirvel an analañ (sl. *apnée : syndrome des ~s du sommeil*).

ondulation épigastrique ◇ **peristaltic wave** ◇ **amdonnegad** *g. an argreuzenn* Anadenn a stader en isvoll ar porzhier : gwagennad a gleiz da zehou eus speur ar c'hof, diwar ur meni dasstrizh kridek eus kahersaeoù ar stomok o stourm ouzh ar skoill.

ond-

- *altérations de l'onde T* daralladoù ar wagenn T
- *aspect ondulé des parois artérielles* neuz wagennek speurioù an talmerennoù
- *fièvre ondulante* terzhienn wagennek pe wagennus
- *longueur d'onde* trohed
- *onde carrée* gwagenn reizhkorn
- *onde d'excitation* gwagenn vlivaat pe vroudañ
- *membrane ondulante* lienenn neuennus
- *onde de choc, onde explosive* gwagenn edrur, gwagenn vlosk, bloskavel, rutenn vlosk, aerstroñsad, aerdourad, c'hwa
- *onde en dôme* gwagenn war gouc'h
- *onde rapide* gwagenn herrek
- *onde systolique* gwagenn sistole
- *ondes de contraction* gwagennoù argrezañ
- *ondes en pointes* gwagennoù pikek
- *ondes T amples, pointues* gwagennoù T ampl, begek
- *phénomène ondulatoire* anadenn wagennek
- *pointe-onde* pikbaot
- *ondulation* pe
- *battements des cils vibratiles* houlennañ ar blevanoù kreniat.

ongle, TA unguis ◇ **nail** ◇ **ivin** *g. -où* Lavnnenn gormin o c'holeiñ talbenn a-gein eizhaenn bellek ar bizied (sl. *lunule (de l'ongle)*).

ongle incarné, onyxis latérale ◇ **ingrowing nail** ◇ **ledivinfo** *g., ivin sanket* Tanijenn nant kostezel ivin ur biz troad (peurliesañ nant diavaez ivin ar meud), o tec'han ur c'houliez linus ha fouevanek ma sank ribl an ivin (sl. *périoronyxis*).

onglée ◇ **numbness of fingertips** ◇ **ivinrev** *g.* Derez kentañ eus revad an daouarn : ruz ha koeñvennek eo an amwiskadoù, ganto ul laur gloazus (sl. *gelure*).

ongles jaunes : syndrome des ~, xanthonychie ◇ **xanthonychia** ◇ **azoniad an ivinoù melen** Kevreted dibaot hag andispleget ezreolderioù a 'n ivinoù, a zo melen, bolzek kenan a-ziadreuz hag astalet o c'hreskiñ, ul limfc'houlivn a 'n izili traoñ hag un tizhad analadel (krezenno naouezennus henek, alies war un dro gant poreadoù bronkezskeventel).

onguent ◇ **ointment** ◇ **traet** *g.* Angevezh toazek tevoc'h eget an ogan, nemet o liñvennañ ouzh gwrez ar c'hroc'hen (sl. *baume, embrocation, liniment, pommade*, La-18 289 hh.).

onirique ◇ **oniric** ◇ **1 ~hunvre, hunvreek** *aa.* **2 hunvreel** *aa.* **3 errizhek** *aa.* **4 errizhel** *aa.* 1 Gant doare an hunvre. 2 A-zave d'an hunvre. 3 Gant doare an errizh. 4 A-zave d'an errizh.

NOTENN : Dispis eo aet ster Gl. *onirique*, pa zave d'an anadennoù bonan ez eo an hunvreoù ha d'ar rambreoù (gant an arverioù e lavar an arz hag ar yezh voutin) diouzh un tu ha, diouzh an tu all, da stadoù kleñvedel. Un alberz eus furmoù an errizhañ a gaver e La-15 67.

onirisme, délire onirique ◇ **oneirism, onirism** ◇ **ambren b. errizhel, errizhañ ambree** Darallad bred naouus dre un heuliad trezerc'hioù, gweledel dreist holl, war ur goueled kefroù hag arluz hep ma steuz skiant an amved, furm ambren stadet e poreoù hag e pistriadiurioù 'zo, en alfo alkoolel lemm pergen (sl. *délire alcoolique aigu*).

oniroanalyse ◇ **oneiroanalysis** ◇ **errizhelfennañ** Hentenn amc'hwiliñ an diemouez dre studi an errizhoù devoudet gant danvezennoù bredviretis (hachich, meskalin).

onirogène ◇ **oneirogenic** ◇ **1 errisheiat 2 errisheiad** g. -où **1** En araez da zevoudañ errizhoù. **2** Danvezenn errisheiat (sl. *psychodys-leptique*).

oniroïde : état ~ ◇ **oneiroïd states** ◇ **stad b. rambreel** A-zivout ur mod a 'n oberiezh vred ma fell ar galloud da zeznadiñ ar stlenn o tont eus ar bed diavaez hag ar stlenn o tont eus ar bed diabarzh, ar gouziviad o chom emouez ouzh e amved, en ur vannañ outañ avat steudadoù rambreoù a zibun evel filmoù war ur skramm.

onomatmane ◇ **onomatomanic** ◇ **1 gervariat aa. 2 gervariad** g. -ed **1** O vezañ gant ar gervar. **2** Gouziviad ar gervar. **onomatomanie** ◇ **onomatomania** ◇ **gervar g. -ioù** Mac'henn a laka ar gouziviad da zistagañ pe da chom hep distagañ, da zoujañ pe da c'hoantaat klevout ar ger-mañ ger.

ontogénese, ontogénie ◇ **ontogenesis** ◇ **unandarzh** g. Diorreadur an hinienn, lerc'hiad ar stadoù ma tremen drezo ur bevedeg adalek ar vi betek an oadouriezh (sl. *Haeckel : loi de ~, phylogénese*).

onychotrophie ◇ **onychotrophia** ◇ **ivinisteñv** g. Isteñv ganedigel pe arzeuat an ivinoù.

onychauxis ◇ **onychauxis** ◇ **ivinusteñv** g. Usteñv ganedigel pe arzeuat an ivinoù, hag int diorreet reoliek.

onychogène : évolution ~ ◇ **onychogenic evolution** ◇ **emdreñ ivinbaradel** Emdreñ o c'hoarvezout gant kelligoù Malpighi e par *korf an ivin* (TA *corpus unguis*, Gl. *plaque unguéale*) hag o vont betek furniñ holl elfennoù an ivin.

onychographie ◇ **onychography** ◇ **onikografñ** Muzuliañ ha lerc'hwezañ ar gwask e gwazhied an ivin (*poulz ivinel*, Gl. *pouls unguéal*) diwar-bouez un ardivink anvet onikograf, leteñvel ouzh ar sfigmograf (sl. *sphygmographie*).

onychogryphose, onychogrypose ◇ **onychogryposis** ◇ **onikogripoz** g. Usvent direoliek an ivin (*i. bataraz, i. andennet a-ziadreuz, i. gennheñvel, i. krabanek*) a stader en treid hepken ha gant an henaded.

onycholyse ◇ **onycholysis** ◇ **ivinezglenañ** Disrannidigezh emdarzh korf an ivin diouzh ar mezal ivinel, adalek ar ribl rez betek ar bleuskenn, kuit a erwezh foel.

onychomycose ◇ **onychomycosis** ◇ **mikoz g. an ivinoù, onikomikoz g.** Anafoù an ivinoù diwar foue arvevat, ken *Achorion schoenleinii* (*m. favek*, Gl. *o. favique*), ken *Trichophyton* (*m. trikoftiek*, Gl. *o. trichophytique*).

onycho-ostéodysplasie héréditaire ◇ **osteonychodysplasia** ◇ **ivinaskornviwe** g. Anaez ganedigel dibaot, naouus dre gevreted *a*) ur miwe ivinoù an daouarn, ar re-mañ o vezañ ezvezant, pe isweek, bresk, distummet, *b*) ur miwe a 'n eskern lec'hiet en talbennoù kenvelañ hag e parzhioù nes-kenvell eskern an izili, peurgetket e par an daoulin (padellegoù ezvezant pe isweek), an daouilin (penn ar werzhid) hag al lestr (kentrou askorn ensteudet war an talbennoù peñsoù), a-wechoù : *c*) ezreolderioù el lounezhi hag e livegadur an envezioù ; kleñved hêrezhel treuzkaset er mod trec'hek aotozomek, muiet e werc'hennusted, daskenek e erzerc'hausted, loet ar c'henenn giriek war an un kromozom ha hini ar rizh gwad ABO ; an dioulañ trenkenn hialuroniek a laka d'ober eus an ivinaskornviwe ur mukopolisakaridiz.

onychopathie ◇ **onychopathy** ◇ **ivinnaoued** g. Anvad genadel anaezioù an ivinoù.

onychophagie ◇ **onychophagia** ◇ **ivinezañ** Boaz gant tud 'zo da chaokat o ivinoù.

onychochorrhéxis ◇ **onychochorrhéxis** ◇ **ivinfreg** g. Skarroù a-ziahed, tanavadur ha breskted vuiek an ivin.

onychose ◇ **onychosis** ◇ **onikoz g.** Anvad genadel strafuilhoù teñvel an ivinoù.

onyxis ◇ **onyxitis, onychitis** ◇ **ivinfo** g. A-gent, nep tanienn a 'n derm endan-ivin pe drek-ivin ; hiziv ez amberzer an termen evit ar furmoù henek kevret gant gouliezoù ha fouevanoù (sl. *ongle incarné, périonyxis*).

oophoralgie, ovarialgie ◇ **oophoralgia, ovaralgia** ◇ **vierzost b.** Laur sezet e par ar vierrez a stader e-maez a bep darallad eus an organ.

oophororrhaphie ◇ **oophororrhaphy** ◇ **vierzdlita** AAnlenañ surjanel ar vierrez.

opacifiant ◇ **contrast media** ◇ **product** ◇ **demaera g., aozad g. Xdemer** Danvezenn a zo enni atom ponner o lugañ ar skinoù X hag o temeraat ar rann organ ma vezont ebarzh (sl. *contraste : produit de ~*).

opacimétrie, turbidimétrie ◇ **turbidimetry** ◇ **demerventerezh g., leidventerezh g.** Muzul demerez (leiter) un arluggenn ; kevreizh e vez da devded ar greun ha d'an derez malzenañ.

opacité ◇ **opacity** ◇ **1 demerez g. 2 demerenn b.** **1** Perzh ur c'horf da lugañ ar skinoù. **2** Er skinouriezh, tachad teñvaloc'h er skinselliñ, sklaeroc'h er skinluniñ, oc'h erzerc'haat ur parzh organ o lugañ stankoc'h ar skinoù X (sl. *absorption, opacifiant*).

opac-, opaque

- *analyse opacimétrique des β -lipoprotéines du sérum* elfennañ demerventadel β-lipoproteinoù ar gwadvez
- *injection d'une substance opaque aux rayons X* ensinkladur un danvezenn demer ouzh ar skinoù X
- *observer les vaisseaux opacifiés* arseliñ ar gwazhied demeraet
- *opacification congénitale ou acquise du cristallin* demerâd ganedigel pe arzeuat eus ar ferenn
- *opacification d'une couche du cristallin* demerâd ur gwelead eus ar ferenn
- *opacifier une partie du territoire bronchique* demeraat ur parzh eus tiriad ar bronkez
- *opacités bilatérales diffuses* demerennoù daoudou ha strewek
- *opaque aux rayons X* skindemer, Xdemer
- *produit radio-opaque* aozad skindemer
- *substance opaque aux rayons X* pe *radio-opaque* skindemerenn, Xdemerenn
- ◇ *transparent aux rayons X* skinandemer
- *ulcération et opacité de la cornée* gouliez ha demerez ar gomsae.

opérateur ◇ **operator** ◇ **operator g. -ioù** (Hiloniezh) tachad eus un operon loet en agreec'h d'ar genennoù trevner a c'hell en o far treuzskrivadur an RNA kannad bezañ tolc'het pe delanket gant ar genennoù reoler (gwered ar goudaveroù hag an apo-iserioù).

opération ◇ **operation** ◇ **gwezh g.**, **gwezhiaidenn b.**, **oberatadenn b.** Emelladenn surjaniel.

(-)**opér-**

• *blessure opératoire* gloazad oberatael • *bloc opératoire* kaelec'h oberata • *champ opératoire* maezienn oberata, amgeden • *choc opératoire* bleuz oberatael *pe* surjaniel • *inopérable* anoberatadus • *opérateur* oberataer • *opérer, effectuer un acte* gwezhiañ • *peropératoire* treoberatael, diawezh • *préopératoire* ragoberatael • *salle d'opération* sal oberata.

opercule, **TA operculum** ◇ **operculum** ◇ **goulc'her g.** Termen neuziadurel oc'h arouezñ nep luniad korfadurel o c'holeiñ unan all ; *goulc'her tal-kitem* (TA *operculum frontoparietale*, Gl. *opercule rolandi-que*), parzh eus ar bluskenn empenn o c'holeiñ lodenn uhelañ an *enezenn* (TA *insula*), anezhañ lodenn izelañ an *troennoù rak-nen* ha *drek-nen* (TA *gyrus precentralis* ha *gyrus postcentralis*).

opercule rolandique : **syndrome de l'~** ◇ **frontoparietal operculum syndrome** ◇ **azoniad ar goulc'her tal-kitem** Testkad an azonoù oc'h erzerc'haat un anaf eus ar *g. t.-k.* : seizi an dremm hag an teod, ankevaot.

opéron ◇ **operon** ◇ **operon g.** Stroll amparet, war un hanrann gromozom, gant genennoù trevrenn hag ur c'henenn reoler ; en araez houmañ da zelankañ pe da dolc'hañ treuzskrivadur an RNA kannad ; en hilvoneg ez a an *o.* d'ober un unvez treuzskriñ (sl. *code génétique, gène, inducteur³, répresseur*).

ophiase, **ophiasis** ◇ **ophiasis** ◇ **ofiaz g.** Furm eus ar peliad ma vez gant tachenn ar c'houezh blev neuz wagennek un naer (Gr. ὀφιασις, deveret eus ὄφις “naer”).

ophidisme ◇ **ophidiasis** ◇ **ofidiaz g.** Testkad an darvoudoù devoudet gant brazhad an naeron binimus.

ophryon ◇ **ophryon** ◇ **ofrion g.** Kreiz al linenn o klotañ war an tal gant diaz ar c'hloppenn ha speur grec'h ar podoù lagad.

ophtalmalgie ◇ **ophtalmalgia** ◇ **lagadost b.** Nervost al lagad.

ophtalmia nodosa ◇ **ophtalmia nodosa** ◇ **ophtalmia nodosa** ◇ **ophtalmia nodosa** Kevresaefo pe kornkevresaefo lemm devoudet gant blev binimus ha dreinek un viskoulenn amheulier (*Cnethocampa pityocampa*).

ophtalmie ◇ **ophtalmia** ◇ **lagadfo g.** Anvad genadel anaezioù foel al lagad ; daeraouiñ a reont alies dre ur c'hevresaefo ha chom kantet er gevresae (sl. *cécité des neiges, conjonctivite, kératoconjunctivite épidémique*).

ophtalmie sympathique ◇ **sympathetic ophtalmia** ◇ **lagadfo truezadel** Testkad an azonoù foel (anafoù sae wazhiedel ar voull lagad) o tarvezout da heul un anaf peurliesañ daraezien al lagad all, a zispleger evel erzerc'hadou dreistkizidigezh daleet dre unanhangaeañ (sl. *auto-immunisation, hypersen-sibilité 2, œil sympathisant, œil sympathisé*).

ophtalmique ◇ **ophtalmic** ◇ **~lagad, lagadel aa.** A-zave d'al lagad ; *nervenn al lagad* (TA *nervus ophtalmicus*), unan eus tri barr dibenn an nervenn drigevell.

ophtalmodynamographie ◇ **ophtalmodynamography** ◇ **lagadwaskwezañ, oftalmodinamografiñ** Lerc'hwezañ lammoù talmerenn greiz al luc'hsae.

ophtalmodynamomètre ◇ **ophtalmodynamometer** ◇ **lagadwaskventer g.**, **oftalmodinamometr g.** Ardivink amkanet da vuzuliañ gwask talmerel al luc'hsae.

ophtalmodynie ◇ **ophtalmodynia** ◇ **lagadwa g.** Dremmost o tizhout skoultrennoù malvennel nervenn al lagad.

ophtalmologie ◇ **ophtalmology** ◇ **1 Lagadoniezh b.** **2 Lagadouriezh b.** 1 Imbourc'h skiantel war al lagad, e neuziadurezh, e vevedouriezh, e gleñvedoù. 2 skourr eus ar Vezekniezh o plediñ gant anaezioù al lagad.

ophtalmologiste ◇ **ophtalmologist** ◇ **lagadour g. -ion** Mezeg arbennikaet war anaezioù al lagad.

ophtalmomalacie ◇ **ophtalmomalacia** ◇ **lagadvlodad g.** Isteñv al lagad naouus dre ar boukadur anezhañ ha leiadur ec'honad ar voull, o tarvezout bepred e dianlen un anaez all, tanijennel peurliesañ.

ophtalmométrie ◇ **ophtalmometry** ◇ **lagadventerezh g.** Desavelañ feuriader gouskogañ meteier al lagad ; dreist holl hiziv, desavelañ ar c'hrommder eus pennañ kreistegelc'hioù ar gornsaes diwar-bouez oftalmometr Javal-Schiøtz (sl. *kératométrie*).

ophtalmomycose ◇ **ophtalmomycosis** ◇ **mikoz g. al lagad, oftalmomikoz g.** Anaez al lagad hag e adparzhioù kroc'henglaourgenel devoudet gant ur foue eus ar genadoù *Candida, Aspergillus* ha *Trichophyton* peurliesañ.

ophtalmopathie ◇ **ophtalmopathy** ◇ **lagadanaez g.** Anvad genadel kleñvedoù al lagad.

ophtalmoplastie ◇ **ophtalmoplasty** ◇ **lagadatelviñ** Gwezhiaidenn dazluniañ al lagad hag e adparzhioù.

ophtalmoplégie ◇ **ophtalmoplegia** ◇ **lagadseizi g.** Seizi kigennoù diabarzh pe/ha diavaez al lagad ; *l. diavaez* (Gl. *o. externe*), seizi kigennoù diavaez al lagad ha kigenn uhelaer ar valvenn grec'h ; *l. diabarzh* (Gl. *o. interne*), seizi kigennoù diabarzh al lagad, eleze kigenn kelc'hstrishaer ar mab lagad ha kigenn ar saeou.

ophtalmoplégie internucléaire antérieure ◇ **anterior internuclearis ophtalmoplegia** ◇ **lagadseizi etregronnel arak** Seurtad seizi a'r gigenn eeun kreizel (TA *musculus rectus medialis*) o tevoudañ un daouwel hep ankensteud ; an arbenn goulakaet eo un anaf loet en hordenn a-hed kreizel (TA *fasciculus longitudinalis medialis*) etre gronnoù an nervennoù a-gloppenn III (n. *lagadloc'hañ*, TA *n. oculomotorius*) ha IV (n. *a-boleenn*, TA *n. trochlearis*) (sl. *nerfs crâniens*).

ophtalmoplégie internucléaire postérieure ◇ **posterior nuclearis ophtalmoplegia** ◇ **lagadseizi etregronnel adreñv** Seizi diglok fiñvoù kostezel ar voull lagad, tizhad an eztañ o vezañ brasoc'h gant an eil lagad eget gant egile ; an arbenn goulakaet eo un anaf nes da c'hronn an nervenn a-gloppenn V (n. *bellaat*, TA *n. abducens*) (sl. *nerfs crâniens*).

- ophthalmoplégie nucléaire, polioencéphalite supérieure** ◇ **nuclear ophthalmoplegia** ◇ **lagadseizi gronnel, louedem-pennfo** g. **uhelañ** Seizi kigennoù al lagad diwar anafoù e gronnoù hag e gwiennoù nodiñ an IIIe, IVe ha Vt re nervernoù aglopenn (tizhad troadempennel), e raklen da enebrezh Hutchinson (sl. *Hutchinson : faciès de ~, mésencéphale, nerfs crâniens, polioencéphalite, pédonculaires : syndromes* ~).
- ophthlmo-rhino-stomato-hygrose, syndrome de Creys et Lévy** ◇ **ophthalmorhinostomatohygrosis** ◇ **daer-mic'hi-halvusorc'h** g. Aneaz naouus dre ur reñver borc'hañ padek gant gwagrennoù an daeroù hag an halv ha gant glaourgenn ar fri, kevret gant arzfo al livenn c'houzoug; ac'hin emañ an azoniadur da hini an *daer-mic'hi-halvanvorc'h* pe *azoniad sec'h* (sl. *Gougerot-Houwer-Sjögren : syndrome de ~*); an eil hag egile a seller hiziv evel kleñvedoù unanhangaeel.
- ophthalmoscope** ◇ **ophthalmoscope** ◇ **oftalmoskop** g. Ardivink amkanet war un dro da c'houlaoiñ ha da arsellin deun al lagad (sl. *fond d'œil*).
- ophthalmostat** ◇ **ophthalmostat** ◇ **oftalmostat** g. Ardivink amkanet da zerc'hel digor ha difiñv al lagad e sell d'un oberatadenn warnañ.
- ophthalmotomie** ◇ **ophthalmotomy** ◇ **lagadenbenañ** Gwezhañ ur flañchadenn war ar voull lagad.
- opiacé** ◇ **1 containing opium 2 opiate** ◇ **1 opiomek 2 opiat** g. 1 A-zivout un aozad a zo opiom ennañ. 2 Angevezh opiomek.
- opiöide** ◇ **opioid** ◇ **1 opiomvanek aa. 2 opiomvan** g. -où, **opiomgeveler** g. -ioù 1 A-zivout un aozad leteñvel e weredoù ouzh re an opiom. 2 Rumm peptidoù leteñvel o gweredoù ouzh re an opiom, diounezet evel hezerioù (sl. *morphi-nomématique, récepteur morphinique*).
- opimane** ◇ **opimaniac** ◇ **opiomgaezhiad** g. -ed Estouead ouzh an opiom (sl. *morphinomane*).
- opimanie** ◇ **opimania** ◇ **opiomgaezh** g., **opiomgaezhiadezh** b. Sujadur kreudel ha bredel d'an opiom (sl. *morphinomanie*).
- opiophagie** ◇ **opiophagism** ◇ **opimezadezh** b. Boaz da zebriñ opiom, pe a zoenadoù bihan evel eniñver, pe a gementadoù bras, evel hezer ha bader.
- opisthion** ◇ **opisthion** ◇ **ospistion** g. Poent uhelañ eus an toull bras.
- opisthorchiase** ◇ **opisthorchiasis** ◇ **opistorkiaz** g. Arvevadegezh an avu gant distom eus kerentiad *Opisthorchidae*.
- opisthotonos** ◇ **opisthotonos** ◇ **c'hwenustant** g. Dargrezadur hollek kigennoù astenner ar gouzoug hag ar c'hein, kef ha penn gwaret war dreñv, divvrec'h ha divesker reudet war astenn, ken m'emañ ar c'horf harp war dalenn ar gwele dre e gilpenn hag e seuloù, emstum en a stader en titeanoz, e barradoù droukfell ustantel adreñv, er pilhonfoioù gant uswask enklompennel hag, ent klasel, en darfell (sl. *orthotonos*).
- opium** ◇ **opium** ◇ **opiom** g. Sun dastumet goude skejañ bolc'hennoù glas ur seurtad roz moc'h, *Papaver somniferum*, amparet gant 25 % alkaloidoù, gwezhus ent liael daou stroll anezho : stroll ar fenantren, ma kaver ar *morfin* (10 %), ar *c'hodein* (0,5 %), an *tebain* (0,22 %), ha stroll ar benzil-isokinolein, en o zouez ar *papaverin* (10 %), an *noskapiin* (6 %) hag an *narkein* (0,2 %); talvout a ra an opiom da zavez krai evit oberiañ ar furmoù galenek (doughennadoù, poultr, tentur) ha darbariañ an alkaloidoù; enskrivet war *Listenn ar baderioù*, e ro tro d'ur gaezhiadezh (dre euvriñ, dre zewentañ e rezh burezh diwar leskiñ); ent yac'hadel e vez danvezet evel bon da liaoù hezer, eneppez, enepdarc'hoal hag enebandag (sl. *médicaments soumis à prescription*).
- opothérapie, organothérapie** ◇ **opotherapy, organotherapy** ◇ **opoterapiezh b., organgurañ, organoterapiezh** b. Arver yac'hadel gwiadoù, gwagrennoù pe organoù, forzh pehini e ve ar mod diounit anezho; en devoud e talvez an termen da venegiñ arver yac'hadel ar gwagrennoù enborc'hañ, ken en o stad natur, ken e rezh doughennadoù, pe c'hoazh an hormonou a-gevanaoz.
- Oppenheim : maladie d'~, dermatite des prés** ◇ **meadow dermatitis** ◇ **kleñved Oppenheim, kroc'hengo g. ar pradeier** Kroc'hengo eritemgloevennel a stader goude un heoliadenn hirbad graet er pradeier, goude ur gouronkadenn pe ur c'hwezadur puilh; kiriek e ve intridigezh ar c'hroc'hengo gant ar c'hlorofil en ardizh al luc'h; da arlenad e vez a-wechoù maelennoù livegat pe disliv.
- Oppenheim : pseudo-tabès hypophysaire d'~, pseudo-tabès acroméganique de Sternberg** ◇ ◇ **gaoudabez g. gougorfennel Oppenheim, gaoudabez keurvlêchegel Sternberg** Kevreted un azoniad nerval, ouzh e ober strafuilhoù an eraeziñ endonell ha steuz an damougoù a-stirenn en izili traoñ, hag un azoniad enborc'hadel, anezhañ erzerc'hadoù un isvorc'hegezh a 'r rakgougorfenn e dianlen un adenom, en o zouez a-wechoù azonou 'zo a geurvlêchegezh.
- Oppenheim : signe d'~** ◇ **Oppenheim sign** ◇ **arouez b. Oppenheim** Astennidigezh ar meud troad pa froter kigennoù rannbarzh arao-k-diavaez ar c'har, oc'h erzerc'haat un anaf er stird pikernennek, arouez kevatal da arouez Babinski (sl. *Babinski : signe de ~*).
- opportuniste** ◇ **opportunistic** ◇ **1 koulzataer aa. 2 koulzataer, kevaraezet** 1 Oc'h emvataat eus an amveziadoù. 2 (Bakteriouriezh) *bakteri koulzataer* a reer eus garvevion dinoaz bezant er bevedeg, o vont da gleñvedus pa vlina an difennoù anezhañ; heñvel dra ez anver *poroad kevaraezet* an anez devoudet gant ar bakteri koulzataer (sl. *bactéries opportunistes, infection opportuniste, mélioidose*).
- oppositionnisme** ◇ ◇ **gourzhargrezañ** Strafuilh al loc'hadegezh naouus dre un argrezañ diarzoug eus ar c'higennoù gourzhaler pa glasker definiñ ur rann ezel, da skouer, argrezañ diarzoug ar gigenn bevarfennek o herzel ouzh plegadur gouzañvat ar c'har war ar vorzhed; reuter o steuziañ buan a-walc'h, da ziforc'hiñ diouzh reuted an arteriosklerozeion.

oppos-

• *agressivité, opposition, turbulence, instabilité* darwantusted, arbennusted, breziker-ezh, distabilled • *contraction de sens opposé au péristaltisme normal* argrezad o loc'hañ a-c'hin d'an amdonnegezh reol • *dents, doigts opposables* dent, bizied keharpus • *diamétralement opposés* ragenep a-dreuzkiz • *force de frottement qui s'oppose au mouvement d'une particule* nerzh rimiañ arbenniat ouzh loc'h ur rannig • *individus de sexe opposé* hiniennou a-eilrev • *inflexion de sens opposé à une déformation du rachis* gourzhpleg d'un disneuziad eus al livenn • *la Lune en opposition avec Saturne* al Loar e ragenebiezh gant Sadorn • *les faces opposées de la paroi interne de la cavité* taliou kevenep speur diabarzh ar gavenn • *péristaltisme de sens opposé* amdonnegezh gindu • *perte de l'égalité entre les composantes opposées* koll an ingalded etre ar c'hedrannoù kevenep • *présence (d'un organe) du côté opposé* bezañ a-c'hindu (un organ) • *qui s'oppose à la formation d'amas de globules rouges* o skoilhañ ouzh tolpadur ar c'helligoù ru • *rendant impossible l'opposition du pouce* o tic'hallusaat keharpañ ar meud • *s'opposant aux oreillons* oc'h enebñ ouzh ar jotorell • *substance s'opposant à la stimulation des récepteurs* danvezenn o parraat ouzh fraouadur ar buzerioù • *troubles moteurs du côté opposé* direizhoù loc'hadel a-eiltu.

opsiurie ◇ **opsiuria** ◇ **opsiuriezh** b. Dale dioulañ an dour goude ar predoù, lakaet war wel dre rannelfennañ an troazh, azon a stader peurgetket e tro skorted henek ar gaenuslouezhenn.

opsoclonie, opsoclonus ◇ **opsoclonia, opsoclonus** ◇ **lavig g. al lagad, lagadkridañ** Azoniad dibaot tre (1/10⁷ a'r boblañs ved dre vloavezh), dianav e arbenn, anezhañ fiñvoù antrevnek herrek ar boullou lagad, o trebadout e-doug ar c'housked, kevredet a-wechoù gant kahegridoù hag ankedre ilpenel (sl. *Kinsbourne : syndrome de ~*).

opsonine ◇ **opsonin** ◇ **opsonin** g. Globulin hezeleizh en araez da unaniñ gant ar bakteri evit kevaraezañ ar fagokitañ anezho; bezant e gwadvez an hiniennou bonan, paotoc'h e hini an dud bet hangaet dre vaksinañ; kemm a lakaer etre a) an *o. spesadel* d'ur seurtad bakteri, gwrezstabil, anezho antikorfoù (immunoglobulinoù G pe Ig G) o tedennañ ar bakteri etrezek ar fagokit hag ouzh o lenañ outo, b) an *o. anspesadel*, gwrezhestez, anezho ur gedrann klokaenn (C3), o vont, goude blivaerezh houmañ, da lenañ ouzh ar bakteri (sl. *complément, immunoadhé-rence, phagocytose*).

opsonisation ◇ **opsonization** ◇ **opsoninaat** Lenañ opsonin ouzh gorre ar bakteri.

opticien ◇ **optician** ◇ **optikour** g. **-ion** Oberier pe kenwerzhour lunedoù ha binvioù optik.

optométricien ◇ **optometrician** ◇ **optometrikour** g. **-ion** Michereg oc'h embreger an optometriezh.

NOTENN : Kevazañvet eo an optometriezh ha dastalet e vez briwerzhioù an optometrikourion d'ar c'houzviaded en un nebeut riezoù, evel Breizh-Veur hag Iwerzhon; kevazañvet eo ar vicher met n'eo ket dastalet ar prederioù e riezoù all, en o zouez Denmark ha Spagn; e riezoù all (Frañs, Belgia, Alamagn) n'eus na kevazañ na dastalañ. Merkomp neozh ez eo aotreet bremañ e Frañs an optikourion da welandalañ o arvalion hep erskriverezh ur mezeg.

optométrie ◇ **optometry** ◇ **1 gwelandalerezh g. 2 optometriezh** b. 1 Desavelañ bevennoù ar gweled spis dre araez un ardivink anvet *optometr*. 2 Micher yec'hedel o plediñ gant ar benvegad gwelout, dre imboure'hiñ arc'hwelioù al lagad [lagadventerezh (sl. *ophthalmométrie*), kornaevaenterezh (Gl. *kératométrie*), gouskgenterezh (Gl. *réfractométrie*), gwelandalerezh], deznaouiñ an direizhoù ha pourchas an aveadurioù optikel.

optotype ◇ **optotype** ◇ **gwelrizehenn** b. Lun, sifrenn pe lizherenn arveret da vuzuliañ al lemmded weled (sl. *acuité visuelle, Landolt : anneau de ~, Rossano : optotype de ~*).

(-)opt-

• *agnosie optique* gwelandaenad • *ataxie optique* ankedre gweledel • *appareil d'optique* ardivink gweledel, luc'honi • *atrophie optique* istefñ an nervennoù gweled, istefñ gweledel, antefñ gweledel • *axe optique* luc'hahel • *densité optique* douester optikel • *dioptr* dioptr • *dioptri* dioptrie • *entoptique* enlagadel • *foyer (optique)* sti • *infini (optique)* trafell • *instrument d'optique* ardivink optikel • *isométrie optique* izomeriezh drec'hel • *nerf optique* nervenn weled • *névrite optique* nervennfo gweledel • *noyaux supra-optiques* gronnoù us-gweled • *optique* luc'hel, luc'honiell, luc'honiezh, optik, optikel • *optique (lentilles)* luc'honi • *puissance (optique)* skizhuster • *radiations optiques* saezhennadur a-weled • *système optique* reizhiad optikel • *tractus optique* stirad gweled • *voies optiques* forzhioù gweled.

or ◇ **gold** ◇ **aour** g. Elfenn gimiek, arouez *Au*, niverenn atom 79, niver tolz 197, metal melen, doues, goveliadus hag orjalennus, tredanreüs kenan, o venel andarall e hogos an holl veteier; perzhioù enepore zo gant an aour er stumm kolloidel; diounezet e vez halioù aour a-hirbad ouzh al liesarzfó henek; ur c'halvezder nevez e prederiadur ar c'hankroù dre ar skinoù *α* eo enteñ er c'helligoù klañv nanorannigoù aour enklouzet enno derc'hanoù aktiniom skinoberiek — dre ledanviñ e komzer a *aour skinoberiek* (sl. *chrysopexie, chrysothérapie*).

oral : stade ~ ◇ **oral stage** ◇ **pazenn** b. **c'henaouel** (Bredelfennerezh) pazenn gentañ en emdroadur al libido, naouus dre sourusted ar genoù hag an divweuz evel tachadoù erogen : dre oberiezh an emvagañ emañ frammet an darempred kentañ ouzh ergerc'henn, darempred a rizh genaouel a-geñver gant an emvagañ hag ar gougorfañ hervez an euladon : debriñ, bezañ debret (sl. GBLF § 1257).

(-)oral, oro-

• *administration orale* diounit dre euvriñ pe dre ar genoù • pe genaouel • *anticoagulant oral* enepkaouleder genaouel • *contractif oral* hilastaler euvriñ • *crise cheiro-orale* barrad dorngenaouel • *dysmorphie orodactyle* mineuz genoù-bizied • *expression orale, s'exprimer oralement* teodyezhañ • *langage oral* lavar teodel.

- orbite**, TA *orbita* ◇ **orbit** ◇ **pod g. (al lagad)** Kavenn askornel oc'h enderc'hel ar voull lagad.
- orbitométrie** ◇ **orbitometry** ◇ **podventerezh g.** Muzul ec'honad ar pod; ent keitat, etre 25 ha 30 cm³.
- orbitotomie** ◇ **orbitotomy** ◇ **podenbenañ** Digeriñ surjaniel kavenn ar pod.
- orbitotonométrie** ◇ **orbitotonometry** ◇ **gwaskventerezh g. ar pod, podwaskventerezh g.** Muzul ar gwask enpodel.
- orchialgie** ◇ **orchialgia** ◇ **klidennost b.** Nervost klidenn.
- orchidectomie** ◇ **orchiectomy, orchidectomy** ◇ **kellezvenañ** Lemel surjaniel ur pe an div glidenn (sl. *castration*).
- orchidomètre** ◇ **orchidometer** ◇ **orkidometr g.** Steudad patromoù a geñverier outo ar c'hliednoù en amboaz dewerzhañ mentoù ar re-mañ.
- orchidopexie** ◇ **orchiopexy, orchidopexy** ◇ **kellAanlenañ** Festañ surjaniel er gousac'h ur glidenn ezlec'hia.
- orchidoptose** ◇ **orchidoptosis** ◇ **kellislink g.** Laoskted vuiek ar gousac'h gant diskenn ar glidenn ha dinod teuc'helloù er funig sper (teuc'hvozhell).
- orchidotomie** ◇ **orchidotomy** ◇ **kellenbenañ** Flañchañ ur glidenn.
- orchidovaginopexie** ◇ **orchidovaginopexy** ◇ **kellgouinsaeAanlenañ** Festañ ar glidenn ouzh gwalenn vas ar varlenn dre araez ar c'housinsae eilpenet.
- orchite** ◇ **orchitis** ◇ **klidennfo g.** Tanijenn ar glidenn.
- NOTENN : An arver eus an daou c'heriad *kell* ha *klidenn* ne laka kemm ster ebet etrezo; dibabet e vez an eil pe egile, en deveradoù dreist holl, dre zamantou sonel pe sterel : *kell*, berroc'h, a arverer an aliesañ en deveradoù, *klidenn* (sl. L'Arm 380) a droer outañ pa venner hepkoriñ ar mesk gant un heñvelson.
- ordonnance** ◇ **prescription** ◇ **1 ordren g., ordrenad g. 2 ordrenañs b.** 1 Teskad an erskrivadurioù graet gant ar mezeg d'ar gouziviad, evit a sell ken al liaoù, ken an hanren emvevañ hag an diarbennou yec'hedel. 2 Roll ordrenadoù skrivet gant ar mezeg ha roet d'ar gouziviad.
- ordonnancier** ◇ ◇ **1 odrenadeg b. 2 ordrenañseg b.** 1 Marilh ma tle al liaer enskrivañ ar mestrangevvezhioù ha liaoù al Listenn II en deus pourchaset. 2 Bloc'h paper ordrenañsoù (sl. *médicament &*).
- ordre** ◇ **order** ◇ **urzhad b.** (Bevrummouriezh) rummad renkañ bevoniell (Gl. *taxon*) loet etre ar gevrennad (Gl. *classe*) hag ar c'herentiad (Gl. *famille*) (sl. *biotaxie*, La-08 242 hh.).
- Ordre des médecins** ◇ ◇ **Urzh b. ar vezeion** Aozadur kefridiel e Frañs amkanet da “eveshaat ouzh arzalc'h pennaennoù an divezegezh, ar gewerded, an emouestlañ rekis evit embreger ar Vezekniezh”; frammet eo an Urzh e kuzulioù departamantel, ranndirel ha riezal dilennet o izili; endalc'het e vez pep mezeg da vezañ enskrivet war *daolenn* an Urzh evit gallout embreger e vicher.
- oreille**, TA *auris* ◇ **ear** ◇ **skouarn b.** Organ ar c'hleved, teir rann ouzh e ober : *a*) ar *s. diabarzh* (TA *a. interna*), loet er *garregenn* (TA *pars petrosa ossis temporalis*), anezhi ar *milendall askornek* (TA *labyrinthus osseus*) gannet gant ar *milendall lienennek* (TA *labyrinthus membranaceus*) o c'hoarvezout eus ar *velc'houedenn* (TA *cochlea*), organ ar c'hleved, hag ar *c'hanolioù hantergelc'hiek* (TA *canales semicirculares*) gannet gant ar *sanioù hantergelc'hiek* (TA *ductus semicirculares*), organ ar c'hempouez; *b*) ar *s. grenn* (TA *a. media*), anezhi *kavenn an daboulin* (TA *cavum tympani*), *lienenn an daboulin* (TA *membrana tympani*) ha *kelli ar vrennigenn* (TA *cellulae mastoideae*), *c*) ar *s. diavaez* (TA *a. externa*), anezhi *ode diavaez* ar *c'hleved* (TA *meatus acusticus externus*) ha *pleg ar skouarn* (TA *auricula*).
- NOTENN : E-barzh ar *garregenn* emañ ivez *ode diabarzh* ar *c'hleved* (TA *meatus acusticus internus*), kanol askornek digor e parzh adreñv uhelañ ar *garregenn*, ma tremen nervenn an dremm (VII), an nervenn etreat (VIIbis), an nervenn rakkambr-melc'houedenn (VIII) hag an dalmerenn stihlon-brennigenn (sl. *conduit auditif interne : syndrome du ~, nerfs crâniens*).
- oreillons, fièvre ourlienne** ◇ **mumps** ◇ **jotorell b.** Pore, darreuziat ha tredizhus, naous dre ar c'hoefvadur diaser pe diaheul eus gwagrennoù 'zo, peurgetket ar gwagrennoù halviñ, a-wechoù an ilgreiz, an divgell, gwagrennoù ar vronn, ar vierezioù hag ar skoedenn, kevret alies gant un erwezh pillonel; kiriek dezhañ eo ur paramiksovirus; an deznaou, aezet, a vez dervaeat gant ar wadveizouriezh; erguret e vez dre ar vaksinañ (sl. *Rubulavirus, vaccin antiourlien*).
- orexigène** ◇ **orexigenic** ◇ **ilboueteiat aa.** O tec'han pe o kreskiñ an ilboued (sl. *appétit*).
- orexique** ◇ **orexic** ◇ **ilbouedel aa.** A-zave d'an ilboued.
- organe** ◇ **organ g. organ g.** Elfenn neuziadurel diforc'h o piaouañ arc'hwelioù dibarek.
- organicisme** ◇ **organicism** ◇ **organelouriezh b.** Doazhadur mezegel o tarlakaat ez eo pep kleñved an dianlenad d'un anaf en un organ.
- organique** ◇ **organic** ◇ **1 bevel aa. 2 organel aa., anafel aa., naouedel aa.** 1 (Kimiezh) a-zave da elfennoù o tont eus bevedegoù; er pleustr, a-zivout an elfennoù a zo ar c'harbon kedrannat en o molekul. 2 A-zivout un anadenn e dalc'h darallad kleñvedel neuz un organ pe ur gwiad, sk. : *sourr organel* pe *anafel* pe *naouedel ar galon* (Gl. *souffle organique* ou *lésionnel du cœur*), evel an hini a stader da heul un enkalonennfo; a-gevenep, ur *sourr arc'hwelel* pe *anorganel* pe *ec'hanafel* (Gl. *souffle fonctionnel* pe *anorganique*) zo un erzerc'had ezreol, kuñv hag eiltroüs diwar un direizh e gweredrezh un organ hep anaf dinoadus (sl. *anatomie pathologique, anorganique, fonctionnel, lésion*).

Organisation mondiale de la Santé, OMS ◇ **World Health Organisation, WHO** ◇ **Aozadur Bed ar Yec'hed, ABY** Ensavadur etrevroadel a-zalc'h ouzh ar Riezoù Unanet, krouet e 1945, o sezañ e Genève, en e gefridi an argrafoù bon-anvezel.

NOTENN* : Karezet e vez kellidsteuñv an ABY evit bezañ e dalc'h lazioù prevez, en o zouez kevredadoù bras an ijinerezh liael. (sl. ivez *vaccin, pandémie* ha *covid-19*.)

organisme ◇ **organism** ◇ **bevedeg g. -où** Hinienn, loenel pe struzhel, parzhioù pe organoù ouzh he ober, dezhi ur beved piaouel.

organisme social ◇ ◇ **aozadur g. kedvuhezel** E Frañs, rizh ensavadur o verañ ar goudor ouzh ar riskloù kedvuhezel pennañ evit al labourerion, dasparzhet ar re-mañ e lies hanren : *a*) tri hanren hollek : h. ar c'hopridi (*Kedskor*), an h. gounezal, h. al labourerion dizalc'h, *b*) hanrenoù dibarek damstaget ouzh ar C'hedskor (EDF, GDF, h.a.); *c*) hanrenoù arbennik emren (milourion, SNCF, RATP); hanrenoù diseurt (mezeion embregour, eilerion vezegel kenouestlet, h.a.); lies kef kretadurezh a ziforc'her : ar re a zo en o c'hefridi sammañ ar c'hlevedoù, ar vammelezh, an divarreezh diouzh un tu, henadegzh hag intañvelezh diouzh an tu all; ar c'hefioù a bled gant an darvoudoù labour hag ar c'hlevedoù micherel; erfin *Kef ar goprouñ tiegezh* o talañ ar gouzeuladour familhel.

organite ◇ **organelle** ◇ **organit g.** Elfenn luniek enkitoplasmel (sl. *chondriome, Golgi : appareil de ~*).

organoacidémie ◇ ◇ **gwadvevdrenkegezh b.** Bezañs er gwad eus trenkennoù bevel o tisoc'h eus ar c'hennevid etreat (sl. *organogaa-cidurie*).

organoacidurie ◇ ◇ **troazhvevdrenkegezh b.** Bezañs en troazh eus trenkennoù bevel o tisoc'h eus ar c'hennevid etreat : trenkennoù *alifatek* (trenkennoù akonitek, adipek, suksinek), trenkennoù *alkool* (trenkennoù kitrek, β-hidroksibutirek, laktek, malek), trenkennoù *ketonek* (trenkennoù α-hidroksibutirek, piruvek), e-maez an amindrenkennoù hag an trenkennoù fenol (sl. *Lowe : syndrome de ~*).

organofonctionnel : syndrome ~ ◇ ◇ **azoniad naouedarc'hwelel** Azoniad naoues dre gevreted un darallad flugezel, organel, oc'h anadiñ dre e arouezioù piaouel hag ur vroudadusted ezreol eus ar reizhiad nervstruzhel, arc'hwelel, houmañ o telankañ darvoudoù evel, da skouer, *gwentl a' n' avu, kevenkez bruched, astma*.

organogénésie, organogenèse, organogénie ◇ **organogenesis** ◇ **organbarañ** Hollad an argerzhioù o tisoc'h gant furmidigezh an organoù.

organographie, organologie ◇ **organography** ◇ **organandezluniañ** Deskrivañ an organoù.

organoleptique ◇ **organoleptic** ◇ **merzhadennel aa.** A vez merzhet gant ar skiantennoù (sl. La-16 369 n. 7).

organotrope ◇ **organotropic** ◇ **organgerc'h aa., organgerc'hus aa.** A denn da lenañ ent hanbarek ouzh un organ.

organotropisme ◇ **organotropism** ◇ **organgerc'h g., organgerc'husted b.** Perzh gant viruzoù pe skodoù bakteri 'zo da lenañ ent hanbarek ouzh un organ.

(-)organ-

- *acide minéral ou organique* trenkenn veinel pe vevel
- *acide organique* bevdrenkenn
- *affection organique* anaez organel, naoued
- *altérer les propriétés organoleptiques* darallañ ar perzhioù merzhadennel
- *anomalie organique de la conduction atrio-ventriculaire* direizh naouedel an tredanren kentez-kofig
- *anorganique* anorganel, ec'hanaf
- *arrêt de l'organogenèse* damiñ an organbarañ, ehanbar, aneroubar
- *atteinte organique* naoued
- *cause organique* arbenn naouedel
- *chimio-organotrophe* kimi-vevdeñvek
- *comité d'organisation* poellgor trevnañ
- *composé organique* bevgediad
- *dépourvu d'atteinte organique* ec'hanaf
- *déviations de l'organogenèse* mibar
- *en dehors de toute sténose organique* e-maez a bep anaf isvullus
- *ensemble organisé* trevnañ
- *faiblesse organique* gwander organel
- *harmonieusement organisé* hedrevn
- *hématome organisé* gwatoñv trevnet
- *inorganique* anvevel
- *iode organique* iod bevel
- *liquide organique* liñvenn vevel pe vevedel
- *maladie organique* naoued
- *matériel organique* dafar bevel
- *micro-organisme* garvev, korrvav, korrvavedeg
- *morphologique, anatomique, organique* neuziadurel
- *organe cible* organ buk
- *organe prothétique* organosod
- *organique, biologique* bevel, bevedel
- *organique, lésionnel* anafel
- *organiser, agencer, disposer, structurer, combiner, monter* trevnañ
- *organogel* organogel
- *organo-souffré* bevulfuret
- *organisme vivant* bev
- *physiologique, biologique, organique, physique* organel
- *physique, organique, somatique* kreudel
- *poussière (organique)* uloc'h bevel, uzor
- *souffle organique* sourr anafel pe naouedel
- *synthèse (par l'organisme)* enaoz, enaozañ, enaozadur, enaozerezh.

orgasme ◇ **orgasm, climax** ◇ **oriadell b.** Renn ar bliz revel.

orgelet ◇ **sty, hordeolum** ◇ **stuienn b.** Hesked a' r valvenn evodet diouzh ar wagrenn soav stag ouzh ur valgudenn.

(-)orifice-

- *absence d'orifice du vagin* andigor ar gouin
- *communication interventriculaire haute formant un orifice atrioventriculaire large commun aux quatre cavités* kehentad etre-kofigoù uhel o furniñ ur bouc'h ledan boutin etre ar peder c'havenn
- *l'orifice de la hernie* ode pe igorenn an aveleñ
- *l'orifice interne du col utérin* gwask diabarzh gouzoug ar grozh
- *les deux uretères se rejoignant avant de s'aboucher dans la vessie par un orifice unique* an div san droazh o kejañ kent difourkañ er c'hwezhiell dre un digor hepken
- *orifice aortique du cœur* gwask an aortenn
- *orifice aortique du diaphragme* grem an aortenn
- *orifice buccal* faout ar genoù
- *orifice d'évacuation* toull diskarg
- *orifice du conduit auditif externe* savnig diavaez ar c'hleved
- *orifice étroit, collet* mulgul
- *orifice inguinal profond* gwaleñn don ar varleñn
- *orifice qui met en communication l'aorte et l'artère pulmonaire*

igorenn o kehentaat an aortenn hag an dalmerenn a-skevent • *orifices ampullaires des canaux semi-circulaires osseux* gloestroù askornek ar c'hanoù hantergelc'h-iek • *périorifical* tro-igorennoù • *pluriorifical* liesigorennel.

origin-

• *accolement d'origine inflammatoire* kempedag diwar danijenn • *canal à l'origine des hernies* kanol o reiñ tro d'an avelennoù • *cellule neurosensorielle qui est à l'origine de la vision photopique* kellig nervskiantennel a zo araez ar gweled fotopek • *d'origine artérielle* a-dalmerenn • *épithélium originaire de l'autogreff* epitelienn evodet eus an imboud unanien • *fibres d'origine des nerfs* gwiennoù nodiñ an nervennoù • *sérum d'origine animale* gwadveiz a orin loenel.

Ormond : maladie d'~, fibrose rétropéritonéale idiopathique ◇ **Ormond disease** ◇ **kleñved Ormond, fibroz g. drek-ampelenn hennadek** Kleñved dianav e arbenn, naouus *ent neuziadurel* dre an dinodiñ e-barzh ar behin drek-ampelenn eus ur gwiad stirek a 3 da 4 cm tevder astennet adalek an eil melenn dargeiz betek penntir an askorn kroazell; engronnañ a ra, hep o aloubiñ, al lounezhi, ar sanioù troazh, an aortenn, an talmerennoù aglun boutin, ar wazhienn gav izelañ hag, a-wechoù, gwazhiennoù ar gandedenn hag ar wazhienn borzh; *ent klinikel*, dre zarallad ar stad hollek, tizhadur ar benvegad troazhañ (amwask ar sanioù troazh o tevoudañ lounezhoefiv, poreadur, gwadusvec'h urea hag ar marv dre antroazh) hag arouezioù amwask ar gwazhied; ergemennet eo bet ar c'haengurañ hag ar skingurañ; e degouezhioù 'zo e ranker treiñ ouzh ar surjianerezh evit divac'hañ an organoù amwasket (ar sanioù troazh pergen).

ornithine-carbamyl-transférase ◇ **ornithine carbamyl transferase** ◇ **ornitin karbamil transferaz g.** Enzim avuel o tasperzhiañ en urebarañ; e wadvec'h, reol dindan 15 U/l, a ya reñverek da heul kelligloez an avu; diwar an diouer anezhañ, hêrezhel hag Xereet, e tarvez ur gwadusvec'h amoniak, marvus a-wechoù.

ornithose ◇ **ornithosis** ◇ **ornitoz g.** Pore kuñv o tedreiñ evel ur skeventfo anrizhek, treuzkaset d'an den gant lies gouennad evned (an dubeed pergen), kiriek dezhañ *Chlamydia psittaci* (sl. *psittacose*).

orologie ◇ **liñvennoniezh b.** Rann eus ar gorfadurezh vonan pe gleñvedel o plediñ gant liñvennoù ar bevedeg (gwad, limf, iruzenn, fennadoù).

oropharynx, TA pars oralis pharyngis ◇ **oropharynx** ◇ **rann b. c'henaouel ar c'hargadenn, genaouc'hargadenn b., krennc'hargadenn b.** Lodenn greiz ar c'hargadenn, etre live ar stavn e krec'h ha rakkambr ar c'harloc'henn (TA *vestibulum laryngis*) en traoñ (sl. *laryngopharynx, pha-rynx, rhinopharynx*).

orosomucoïde ◇ **orosomucoïd** ◇ **orozomukoid g.** Unan eus an α1-globulinaù bezant e plasma ar gwad.

oroticurie ◇ **oroticaciduria** ◇ **troazhorotikegezh b.** Bezañs trenkenn orotek en troazh; *t. hêrezhel*, kleñved dibaot treuzkaset er mod enkilek aotozomek, erzerc'h adalek mizvezhioù kentañ ar vuhez dre un dilerc'hiñ savder-pouez, un asikted, un amwad islivel muiiek hag ur megaloblastoz mehel, kevret gant un diouladur a-vras a drenkenn orotek; lodek eo houmañ er ristenn gennevidel a ya adalek an drenkenn aspartek betek enaoz an trenkennoù nukleek; en orin ar c'hleñved e ve skorted an daou enzim o werediñ an eil war-lerc'h egile evit ec'haozañ an drenkenn orotek; deskrivañ a reer un *t. arzeuat* gant dioulañ kevret orotidin 5-fosfat, devoudet gant diounezadur ur mitozastaler, ar 6-azaoridin.

orteil en col de cygne ◇ **biz g. troad gouzoug alarc'h** Distummadur an eil biz troad gennet etre ar c'hentañ hag an eil, naouus dre astenn ar 1^{añ} oeñs, plegadur an 2^l hag astenn an 3^e.

orteil en marteau ◇ **hammer toe** ◇ **biz troad morzhol** Lakadur a-bleg ar c'henvell etre-oeñsoù nezek, dinod ur c'harnig war an tal kein anezhañ hag, a-wechoù, war beg ar mezal.

orteils bleus ou pourpres : syndrome des ~ ◇ **blue toe syndrome** ◇ **azoniad ar bizied troad mouk** Livrezh persdu o tont war ar bizied troad e dianlen enfraouioù strinkennoù kolesterol o tont peurliesañ eus an aortenn gof.

orthacousie ◇ **normal audition** ◇ **kleved g. reol, reolglev g. 2 kleveeunañ, kleveeunerezh g.** 1 Arc'hwelañ bonan skiantenn ar c'hlevout. 2 Ergurañ ha kurañ strafuilhoù ar c'hleved (sl. *orthopédie, orthophonie* &).

orthès ◇ **orthesis** ◇ **amsteudell b.** Nep benvegad korfeunañ amkanet da wareziñ, diloc'hekaat, harpañ, arzerc'hel ar c'horf pe ar parzh anezhañ en arloer outañ (astell, kavnell, savnell, gouriz, korfkenn, botez korfeunadel); diforc'hiñ a reer an *a.* diouzh an *harpoù arc'hwelel* hag an *ersteudelloù* (pe *osodotù*); kemm a lakaer etre an *a.* *anoberiezhel* (Gl. *o. d'inactivité*) pe *a.* *diloc'hekaat*, *a.* *emstumm* (Gl. *o. de posture*) hag an *a.* *oberiezhel* (Gl. *o. d'activité*) a zo o fal bevennañ al loc'hadoù; (sl. *aide fonctionnelle, appareil* &, *prothèse, immobilisation, semelle orthopédique*).

orthésiste ◇ **orthotist** ◇ **amsteudeller g. -ion** Oberier amsteudelloù (sl. *prothésiste*).

orthochromasie ◇ **orthochromasie** ◇ **arunneañ** Perzh gant elfennoù gwiadell da gemer an un nead ha hini al livuzenn arveret (sl. *métachromasie*).

orthochromatique ◇ **orthochromatic** ◇ **arunneat aa.** A-zivout an elfennoù gwiadell o kemer an un nead ha hini al livuzenn (sl. *métachromatique*).

NOTENN : An *amwad helivel* (sl. *anémie normochrome*) a vez anvet ivez Gl. *anémie orthochromatique, anémie isochrome*).

orthodéoxie ◇ **orthodeoxia** ◇ **ortodeoksiezh b.** Muiadur un oloksigen (Gl. *hypoxie*) talmerel gant al loadur war sav, endra vez leiaet gant ar gourvez (sl. *orthopnée, platypnée*).

orthodiagramme ◇ **orthodiagram** ◇ **ortodiagramm g.** Skeudenn dewerc'het dre an ortodiagrafiñ.

- orthodiagraphie** ◇ **orthodiagraphy** ◇ **ortodiagrafiñ** Desaveľañ mentoù gwerc'hel un organ (ar galon pergen) diwar ar skeudenn skinsell anezhañ dre gorvoiñ hentenn an diagrafiñ, anezhi lerc'hwezañ argemmadoù al luzded pe an harzded hervez kemm ec'honad un organ poulzus treuzet gant skinoù uheldalm (kalvezder dispredet).
- orthodiascopie** ◇ **orthodiascopy** ◇ **ortodiaskopiñ** Studiañ an organoù dre vannañ an dro-linenn anezho war ur skramm kenderluc'h.
- orthodontie, orthodontosie** ◇ **orthodontics** ◇ **denteunañ, denteunerezh** g. Kevrenn eus an Dentouriezh o plediñ gant ergurañ ha kurañ kammeuziadoù pe disneuziadoù an dent.
- orthognathe** ◇ **orthognath** ◇ **1 serzhavenek aa. 2 serzhaveneg g. -eion** 1 Gant ar serzhaveneg. 2 Den serzhavenek (sl. *prognathe, rétrognathe*).
- orthognathisme** ◇ **orthognathism** ◇ **serzhaveneg** b. Kefluniadur ar fas hevelep ma 'z eo diazerc'h linenn al letu etre an tal hag an elgezh; ent strizh ne vez stadet nep skourr denel serzhavenek; ragavenek e vez an holl mui pe vui; neoazh e reer serzhaveneg eus ar skourroù ma 'z eo linenn al letu an tostañ d'an diazerc'h (skourroù indezeuropat ha semit).
- orthomyxovirus** ◇ **orthomyxovirus** ◇ **ortomiksovirus** g. Viruz eus kerentiad an *Orthomyxoviridae*, gant RNA unarvellek, ur genad hepken ouzh e ober : *Influenzavirus*, hadenn ar grip (rizhoù A, B, C).
- orthonyxie** ◇ **orthonyxia** ◇ **ivineunañ** Prederiañ distummadurioù 'zo eus an ivinoù dre araez ur vac'hig amkanet da zereizhañ ar c'hrommder anezho.
- orthopédie** ◇ **orthopaedics** ◇ **korfeunañ, korfeunerezh** g. Ger luniet gant ar mezeg gall Nicolas Andry e 1741 evel "an arz da zizarbenn ha da zereizhañ disneuziadoù korf ar vugale"; hiziv eo bet astennet an despizadur d'an oadourion : surjianerezh an eskern hag ar benvegad emzilec'hiañ.
- orthopédiste** ◇ **1 orthopaedic surgeon** ◇ **1 (surjian g. -ed) korfeuner 2 steudeller g. -ion** 1 Surjian an eskern hag ar benvegad emzilec'hiañ. 2 Oberier an dafar korfeunañ (amsteudelloù, ersteudelloù).
- 1 orthophonie 2 orthophonie, logopédie, traitement orthophonique** ◇ **1 orthophony 2 speech and language therapy** ◇ **1 reolvouezh g. 2 mouezheunañ, mouezheunerezh** g. 1 Stad vonan ar mouezhparañ. 2 Addiorren arc'hwelioù al lavar, dereizhañ strafuilhoù an distilhañ (gagerezh, kammzistagadurioù), ar milenn, h.a. (sl. *bégaiement, dyslexie, lalopathie*, La-15 376 hh., La-16 258 hh.).
- orthophoniste** ◇ **speech and language therapist** ◇ **mouezheuner g. -ion** Eiler mezegel arbennikaet en addiorren arc'hwelioù al lavar.
- 1 orthopie 2 orthopie, orthoptie** ◇ **1 orthopia 2 orthoptics** ◇ **1 reosell g. 2 selleunañ, selleunerezh** g. 1 Stad vonan ar sellout. 2 Addiorren fiñvoù al lagad, ergurañ ha dereizhañ strafuilhoù ar sellout, al loakrevezh pergen (sl. La-18 80, 249 hh.).
- orthopnée** ◇ **orthopnoea** ◇ **savhec'hwezh g., trec'hwezh g. gourvezel** Trec'hwezh muiaet pa c'hourvez ar gouziviad, leiaet pa goazez pe pa 'z a en e sav (sl. *orthodéoxie, platypnée*).
- orthoptiste** ◇ **orthoptist** ◇ **selleuner g. -ion** Eiler mezegel arbennikaet en addiorren loc'herezh an daoulagad.
- orthostatique** ◇ **orthostatic** ◇ **warsavel aa.** A-zivout al loadur war sav; *troazhalbumineg* w. (Gl. *albuminurie* o.), bezañs albumin en troazh devoudet gant al loadur war sav.
- orthostatisme** ◇ **orthostatism** ◇ **warsaveg** b. Teskad an anadennoù a-geñver gant al loadur war sav.
- orthotonos** ◇ **orthotonos** ◇ **sonnustant g.** Seurtad tetanoz naouus dre zargrezadur a-gedal ar c'higennoù astenner ha pleger oc'h arzerc'hel eeun ar gouzoug hag ar c'hein (sl. *opisthotonos*).
- orthotopique** ◇ **orthotopic** ◇ **reollec'hiat aa.** Loet reol pa gomzer eus ur gwiad, ur furmadur neuziadurel, h.a.
- Ortner : syndrome d'~** ◇ **Ortner syndrome** ◇ **azoniad Ortner** Kevreted seizi ar c'harloc'henn hag isvoll mintrek; kiriek e ve usvoll kef ar skevent oc'h amwaskañ an nervenn gilreder.
- Ortolani-Le Damany : signe d'~** ◇ **Ortolani sign** ◇ **arouez b. Ortolani** Arouez an diskrog, azon a zisvellad a 'l lez, a stader war ar vagadell e deizioù kentañ e vuhez (sl. *Dupuytren : signe de ~, ressaut : signes du ~* 2).
- os** ◇ **bone** ◇ **askorn, l. : eskern** Organ gwenn ha kalet, intret e anneuenngenglenel gant halioù kalkiom; an eskern, 206 anezho e-barzh korf an den oadour, kevreet dre genvelloù, a ya d'ober an *atel* (sl. *squelette*), framm ar c'horf; o dasparzhañ a reer etre eskern plat, ber ha hir; outo emañ enlenet ar c'higennoù (sl. *Havers : canal de ~, oss..., osté...*).
- os de verre, os lavé** ◇ ◇ **askorn peñver** Arvez an askorn treuzwelus ouzh ar skinoù X dre berzh diouer an halioù kalkiom en e anneuenngenglenel, stadet en osteoporoz arbadet hag en ur c'hleñved dibaot, an *askornbarañ diglok* (sl. *fragilité osseuse héréditaire, ostéoporose*).
- oschéoplastie** ◇ **oscheoplasty** ◇ **gousac'hatelviñ** Unanatelviñ dewerc'het evit dazluniañ ar gousac'h (sl. *autoplastie, scrotum*).
- oschéotomie** ◇ **oscheotomy** ◇ **gousac'henbenañ** Dazbidañ ur parzh eus ar gousac'h e ser prederiañ yoc'hennoù 'zo.
- oscillomètre** ◇ **oscillometer** ◇ **luskellventer g. -ioù, oskillometr g. -où** Ardivink amkanet da vuzuliañ gwask uc'hek, izek ha keitat ar red gwad talmerel war un dro gant a ditourenn luskellventañ.

- oscillométrie** ◇ **oscillometry** ◇ **luskellventañ, luskellventerezh** g. Studi ar gwask talmerel ha heled al lammoù talmerel diwar-bouez al luskellventer.
- oscillométrique** : **indice** ~ ◇ **oscillometric index** ◇ **ditourenn luskellventañ** Niver meneget gant al luskellad brasañ eus nadoz al luskellventer.
- oscillopie, oscillopsie** ◇ **oscillopsia** ◇ **luskellwel** g. Kammzerc'had gant gouziviaded an nistagmuz, anezhañ luskelladur an traoù morzhet.
- ose, monosaccharide** ◇ **monosaccharide** ◇ **oz** g. -ioù, **monosakarid** g. -où Danvezenn eeun andourrannadus eus kerentiad ar glukidoù, outi lies soaz alkool hag ur soaz direer pseudoaldehid (*aldoz*) pe pseudoketonek (*ketoz*); hervez niver an atom karbon en o molekul, en o rummer e *tetroziou* (eritroz, treoz), *pentozioù* (arabinoz, riboz, ksiloz), *heksozioù* (glukoz, galaktos, mannoz, guloz, idoz), *heptozioù* (sedoheptuloz), h.a. (sl. *oside*).
- oside** ◇ **oside** ◇ **ozid** g. Kediad dourrannadus en un pe lies oz; o dasparzhañ a reer en *a) holozidoù*, amparet gant ozioù nemetken (diholozidoù, triholozidoù, tetraholozidoù, pentaholozidoù, h.a., poliholozidoù pe poliozioù pa vez uhel enno niver an ozioù), *b) heterozidoù* pe *glukozidoù*, o vont dre zourrannadur da ozioù ha d'ur rann anglukidek pe aglikon.
- osidose** ◇ **osidose** ◇ **ozidoz** g. Diholozid direer, ar maltoz da skouer.
- osidoside** ◇ **osidoside** ◇ **ozidozid** g. Diholozid andireer, ar sakaroz da skouer.
- Osler** : **manœuvre d'~** ◇ **Osler maneuver** ◇ **embreg** g. **Osler** Proud amkanet da zinoñ an uswask talmerel hañvalat (gaouswask) gant henaded o zalmerennoù sklerozek hag anamwaskadus gant brec'hgenn ar gwaskventer, hemañ o wereañ sifroù reñverek e-skoaz ar gwask gwirion; yaek eo ar proud pa chom teutadus an dalmerenn a-werzhid goude ma volc'her ar brec'hgenn dreist ar gwask sistolel hañvalat.
- Osler** : **nodule d'~**, **pseudopanis d'~** ◇ **Osler node** ◇ **nozeleñ** b. **Osler, gaouveskoul** g. **Osler** Ozvenn ruz laurus a vent gant ur ferenn, dinodet e-kerz ur resmiad terzhienn, e diabarzh derm mezal ar bizied daouarn ha treid war gouziviaded kleñved Jaccoud-Osler (pe enkanolennoù bakteriell goulemm) (sl. *Jaccoud-Osler* : *maladie de ~*).
- Osler** : **pneumonie lupique d'~** ◇ **skeventfo lupuzel Osler** Lec'hiadur skeventel al lupuz eritematus lemm strewek, o c'hoarvezout a anafoù parenkimatus daoudu erzerz'h war ar skinlunioù dre skeudennoù rouedek, rouedek-nozelek pe nivlennek.
- osmolalité** ◇ **osmolality** ◇ **osmolder** g. **tolzel, osmolelezh** b. Niver osmoloù (Osm) (pe miliosmoloù, mOsm) dre kilogramm dileizhuz-enn; unanenn : Osm/kg (pe mOsm/kg).
- osmolarité** ◇ **osmolarity** ◇ **osmolder ec'honel, osmoleriezh** b. Niver osmoloù (Osm) (pe miliosmoloù, mOsm) dre litr dileizhenn; unan-enn : Osm/l (pe mOsm/l); an *o.* a gevaraez jediñ ar grenn e paskaloù (Pa).
- osmole** ◇ **osmole** ◇ **osmol** g. (Arouez Osm), grenn gweredet gant ur mol a 'r rannigoù gweredek en treizezhiñ ebarzh un dileizhenn.
- osmomètre** ◇ **osmometer** ◇ **grennventer** g. -ioù, **osmometr** g. -où Ardivink amkanet da vuzuliañ ar grenn.
- osmométrie** ◇ **osmometry** ◇ **grennventerezh** g. Muzul ar grenn.
- osmorécepteur** ◇ **osmoreceptor** ◇ **grennfraouva** g. Dibenn navel kizidik ouzh argemmoù ar grenn e metoù diabarzh ar bevedeg; loet emañ ar *grennfraouva*ñ nes d'ar gronnoù us-gweled e tiar ar garotidenn diabarzh; pa vezont fraouaet dre viadur ar grenn er gwad e vez delantek ur vorc'hadenn hormon eneproasheiat (sl. *diurèse osmotique*).
- osmose** ◇ **osmosis** ◇ **treizezhiñ** Tremen an dileizhuzenn adalek an dileizhenn al leiañ bec'hiek etredek an dileizhenn vec'hiekañ a-dreuz ur gennenn handreuz; tennañ a ra an treizezhiñ da gevatalaat ar bec'hioù; gevennañ a reer an anadenn dre ren ur gwask war an dileizhenn vec'hiekañ; ar gwask o herzel an tremen eo ar gwask treizezhiñ pe *grenn*; evel kennenoù handreuz e wered koc'henoù ar c'helligoù bev dre lezel an dour ha kevionennoù 'zo da dremen.
- osmotique** : **pression ~ efficace du plasma** ◇ ◇ **grenn gwerc'hek ar plasma** Grenn kevionennoù ar plasma, o perzhiañ en eskemmoù dour etre ar gennadoù en- hag ezkelligel; an diforc'h eo etre ar grenn hollel (eus 308 da 310 mOsm/l) ha grenn an urea hag ar glukoz; ent reol, emañ *g.g.a.p.* etre 292 ha 308 mOsm/l (sl. *comprimé, oncotique* : *pression ~*).
- osselets de l'ouïe, TA ossicula auditus** ◇ **ear bones** ◇ **eskernigoù ar c'hleved** Ristenn eskern bihan loet er skouarn grenn : ar morzhol (TA *malleus*), an annev (TA *incus*) hag ar stleg (TA *stapes*), o treuzkas ar froumoù eus kavenn an daboulin da brenestr ar rakkambr (sl. *oreille*).
- ossiculectomie** ◇ **ossiculectomy** ◇ **eskernigezvenañ** Digewanañ eskernigoù ar skouarn grenn.
- ossification** ◇ **ossification** ◇ **1 askornaat 2 askorneiadezh** b. Furmiñ ha diorren ar gwiad askorn reol (sl. *ostéogénèse*); *a. ennigornel* (Gl. *o. enchondrale*), *a.* o tarvezout e diabarzh ar gwiad migorn goude deloezadur hemañ (*a. ameeun*); *a. kennennel* (Gl. *o. de membrane*), furmiñ gwiad askorn war eeun diwar eginenn vezenkimatus eskern 'zo (eskern ar c'hlopenn, gaved); *a. amaskornennel* (Gl. *ébauche périostale*), furmiñ askorn gant an amaskornenn o c'holeiñ an dreuzenn 2 furmiñ askorn kleñvedel.
- ossifluent** ◇ **ossifluent** ◇ **1 askornloezus aa. 2 askornien** aa. 1 O tevoudañ leidgezh an askorn (sl. *ostéolyse*). 2 Dezhañ da orin un annon askornfo (sl. *abcès ossifluent*).
- ostéalgie** ◇ **ostealgia** ◇ **askornost** b. Laur askorn emdarzh pe gwezhiat (sl. *fièvre de croissance*).
- ostéite** ◇ **osteitis** ◇ **askornfo** g. Tanienn askorn; a-wechoù e vez treuzarveret Gl. *ostéite* evit aroueziañ anaizioù askorn anfoel (sl. *ostéite fibrokystique*), pe poreadoù kempleshoc'h (sl. *ostéomyélite*).

ostéite ou **ostéose fibrokystique** ◇ **fibrocystic disease** ◇ **osteoz g. fibrokistek** Anaez henek e dianlen uc'harc'hwel an arskoedennoù diwar un adenom alies, naouus dre *a*) daralladoù askorn (dirazekaat strewek an atel, stirekaat ar mel ha dinodiñ kistoù liesel), ent klinikel : laurioù, torrou emdarzh, disneuziadoù eskern argammedek hag a-wechoù koefvennoù askornek, *b*) grouangezh rizek al lounezh en ervez da furniñ enni amsikadoù rizek ha da zevoudañ ar skorted anezhi, *c*) a-wechoù, razekadurioù flugez all (talmerennoù), strafuilhoù koazhadel, nerverl, tizhadur ar stad hollek, *d*) un azoniad arskoedusvorc'hel : gwadusvec'h kalkiom ha fosfataz, gwadusvec'h fosfatoù, troazhusvec'h kalkiom (sl. *hyperparathyroïdie*).

ostéite productive ◇ **productive osteitis** ◇ **askornfo askorneiat** Rumm an askornfoioù o tec'h an furmidigezh gwiad askorn ; lavaret e vezont *assavus* (Gl. *restitutives*) pa ratreont an enloezadoù, *douesaus* (Gl. *conden-santes*) pa leiaont kavnez kanolioù Havers (sl. *Havers : canal de ~*).

ostéite raréfiante ◇ **rarefying osteitis** ◇ **askornfo rouesaus** Askornfo gant distruj elfennoù neuziadurel an askorn ha furmidigezh amskaroù (sl. *séquestre*).

ostéoarthritis ◇ **osteoarthritis** ◇ **askornarzo g.** Arzo rouestlet gant anafoù askorn e par an talbennoù kenvellañ.

ostéarthropathie ◇ **osteoarthropathy** ◇ **askornarzo g.** Anaf diaser en ur c'henvell hag en eizhaennoù eskern keñf.

ostéarthropathie hypertrophiante pneumique ◇ **hypertrophic pneumatic osteoarthropathy** ◇ **askornarzo steñvus skeventaden** Kresk ec'honad eskern eizhaennoù an izili, gant paotidigezh an amaskornenn en dro d'an treuzennoù, stadet da gaver poredoù skevent henek pe yoc'h ennoù skevent ha poullkreiz ; kevret e vez peurliesañ gant usteñv ar parzhioù meizh (bizied bazhoulek, batarazek, ivinnoù kromm, koc'hellek), arzostoù ha direizhoù simpatek ; dedreiñ a ra dre resmiadoù laurus.

ostéoblastes ◇ **osteoblasts** ◇ **osteoblast s.** Kelligoù mezenkimatus yaouank oc'h araezañ furmidigezh an anneauenn askorn ; emdreiñ a reont en osteokit.

ostéoblastome ◇ **osteoblastoma** ◇ **osteoblastom g.** Yoc'henn guñv a 'n eskern o wazhañ an dud yaouank e par o livenn gein, o daouarn hag o zreid, amparet gant osteoblast o neriñ hag o tanzen lavnennigoù gwiad osteoidel.

ostéocalcine ◇ **osteocalcin** ◇ **osteokalkin g.** Protein izel e dolz mol (6 000 d) borc'het gant an osteoblast, ennañ trenken gamma-karboksilglutamek ; dezventet dre un hentenn skinhangaell, e talvez osteoidelar feur anezhañ er gwadveziz da verker a 'n ennevid eskernel ; hag eñ reol etre 3 ha 6 ng/mL, ez eo muiaet en arskoedusvorc'h, e kleñved Paget hag en askornvideñv lounezhadien.

ostéochondrite, ostéochondrose ◇ **osteocondritis** ◇ **osteokondroz g.** Mideñv kreskiñ o wazhañ ent hanbarek rannbarzhioù askormigornel 'zo : talpennoù, balegoù, eskern bihan, korfoù melenn ha kenvignadoù (ereadoù etre daou askorn dre ur migorn) ; e renkañ a reer e stroll ar marvennoù anleste dre strafuilh an eroueriañ ; parañ a ra gwech hep arlenad, gwech en ur lezel un disneuziad war e lerc'h.

ostéochondrite ou ostéochondrose de la hanche ◇ **osteocondritis deformañs juvenilis** ◇ **osteokondroz disneuzius yaouerel** Kleñved ar vroñsenn askornaat eus penn an askorn morzhed, ar skeudenn anezhi, da gentañ dastamm, o vont war blataat ha war zouesaat (*coxa plana*) ; dedreiñ a ra d'un artroz a 'l lez ; prederiet diwar an deroù dre ur steudelladur diskarg ha, diouzh ret, dre ar surjianerezh, e pare hep arlenad en degouezhioù gwellañ.

ostéochondrite disséquante ◇ **osteocondritis dissecans** ◇ **osteokondroz enrec'hus** Anaez dibaot o tedreiñ hervez tri lankad : askornvarvennañ endan-vigorn, furmidigezh un amskarn askorn, koeuzh an amskarn e-barzh kavenn an arz ; darvezout a ra dreist holl gant an oadour yaouank, ha tizhout dreist holl ar glin, an ilin hag al lez, o tevoudañ laurioù, kammerezh, reuted, isteñv a 'r c'higennoù, kouboulad a 'r c'henvell ; un orin heskwadel pe daraezel a c'houlakaer.

ostéochondrodysplasie ◇ **osteochondrodysplasia** ◇ **askornmigornviwe g.** Anvad genadel an anezhioù genezhel naouus dre strafuilhoù furniñ ha kreskiñ an eskern hag ar migorn (sl. *chondrodysplasie, ostéochondrodystro-phie, ostéodystrophie*).

ostéochondrodystrophie ◇ **osteochondrodystrophy** ◇ **askornmigornvideñv g.** Strafuilh ar mezhur e par an eskern hag ar migorn (sl. *chondrodystrophie, ostéodystrophie*).

ostéochondromatose articulaire ◇ **synovial osteochondromatosis** ◇ **osteokondromatoz g. irgennel** Anaez dibaot an arzoù (ilin, glin) naouus dre zarallad an irgenn, hemañ o tevaat, o vont bodennek hag o treiñ en ozvennoù migorn a gouezh e-barzh kavenn an arz ma askornaont (osteokondromoù) ; al lamidigezh anezho a barra ouzh un dedro etrezek an artroz ; ganti e kevredre an irgennezvenañ war-benn hepkoriñ an adfeilhoù.

ostéochondrosarcome ◇ **osteochondrosarcoma** ◇ **osteokondrosarkom g.** Yoc'henn gengenel yud evodet diouzh an askorn, ar migorn, an amaskornenn, o tedaoliñ danvezennoù etrekelligel a neuz gant gwiadur an askorn hag ar migorn (sl. *chondrosarcome, ostéosarcome*).

ostéoclasie ◇ **osteoclasia** ◇ **1 osteoklaziñ 2 askorndarnañ** 1 Argerzh bonan deloezañ gwiad an askorn gant an osteoklast (sl. *ostéo-clastes*). 2 Hentenn yac'hadel amkanet da zereizhañ disneuziadoù an eskern hag an arzoù dre derriñ un askorn peurliesañ dre araez un ardivink, graet anezhañ un *askorndarner* (Gl. *ostéoclaste*).

ostéoclastes ◇ **osteoclasts** ◇ **osteoklast s.** Anvad bet lakaet war ar mieloplaks (sl. *myéloplaxes*) dre ma 'z int gwezherioù dispenn danvezenn an eskern.

ostéocytes ◇ **osteocytes** ◇ **osteokit s.** Kelligoù eus ar gwiad askorn, evodet eus an osteoblast.

ostéodensí(to)métrie ◇ **osteodensimetry** ◇ **askorndouesterventañ, lugventañ eskern** Andalañ douester meinel an eskern dre vuzuliañ lugadur ar skinadoù X pe γ (sl. *absorptiométrie osseuse*).

ostéodysplasie, ostéodystrophie ◇ **osteodystrophy** ◇ **askornviwe g., askornvideñv g.** Strafuihl furmiñ ha/pe mezhur ar gwriad askorn o tevoudañ disneuziadurioù bras pe vrasoc'h a 'n atel, o tarvezout e dianlen un namm hilel pe un direizh kennevidel (sl. *ostéodystrophie rénale*).

ostéodysplastie, syndrome de Melnick et Needles ◇ **osteodysplasty, Melnick-Needles syndrome** ◇ **askornvizelv g., azoniad Melnick-Needles** Kleñved hêrezhel dibaot an atel, treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, naouus dre grommder ha furn direolek an eskern hir, dizingal o c'haenenn, arfrank o ardalpenn, ha disneuziadur an eskern plat; peurliesañ e vez tizhet ar c'hloppenn, ar fas, an divlezh hag ar bizied.

ostéodystrophie rénale ◇ **renal osteodystrophy** ◇ **askornvideñv lounezhadien** Erzerc'hadoù askorn o tarvezout e-kerz ar skorted lounezh henek : anafoù askornvlodad hag arskoedusvorc'h eilvedel, e dianlen strafuihoù al lounezhad (ezreolderioù hormonel ha direizhoù kennevid ar vitamin D, ar fosfor hag ar c'halkiom).

ostéoectasie avec hyperphosphatasie ◇ **osteoectasia with hyperphosphatasia** ◇ **askornusvoll gant fosfatazusvec'h** Seurtad dibaot askormmigornviwe hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek oc'h erzerc'hañ er vugeliezh dre ur gorrded, hiperostoz an eskern hir hag ar volzpenn, krommder an eskern morzhed ha reñver henek fosfatazoù alkaliek ar gwadveiz (taolenn gliniek ha bevoniel heñvel ouzh hini kleñved Paget) (sl. *ostéochondrodysplasie, Paget : maladie de ~*).

ostéogénèse, ossification ◇ **osteogenesis** ◇ **askornbarañ, askornaat** Furmiñ ha diorren ar gwriad askorn reol (sl. *ossification*).

ostéoïde ◇ **osteoid** ◇ **osteoidel aa.** A neuz gant ar gwriad askorn : *gwriad o.* (Gl. *tissu o.*), anneauenn brotitek an atel a len outi an halioù kalkiom evit furmiñ ar gwriad askorn reol.

(-) **ostéoïdose** ◇ ◇ (-) **osteoidoz g.** Kedrann arveret evit arouezñ feur ar gwriad osteoidel e-barzh an eskern : daou stroll a reer eus an dirazekadurioù strewk : 1) *kleñvedoù an askornbarañ* : uc'h- pe isosteoidoz (askornvlodad, osteoporoz), 2) *kleñvedoù an askornloezañ* (askornusloez) (sl. *hyperostéolyse*).

ostéologie ◇ **osteology** ◇ **askornoniezh b.** Rann a 'r gorfadurezh o plediñ gant an eskern.

ostéolyse ◇ **osteolysis** ◇ **askornloezañ, askornloez g.** Distruj argammedek ar gwriad askorn; kemm a lakaer etre an *a. reol*, kevassavet gant un askornbarañ kevatalek, hag un *a. kleñvedel*, lec'hiek (da skouer, klazad korf ar mellennoù gant un darvolla a 'n aortenn), pe hollek, reñverek pe ankevassav (askornusloez) (sl. *hyperostéolyse*).

ostéomalacie ◇ **osteomalacia** ◇ **askornvlodad g.** Diveinelaat hollek an eskern dre ziuver lenadur ar fosfor hag ar c'halkiom war anneauenn broteek an askorn pe gwriad osteoidel; anadiñ a ra ent klinikel dre azoniad Looser-Milkman; da arbennoù dezhañ e vez an diouer ardizh an heol, an negez vitamin D, an diouer enankañ ha danveziñ fosfor ha kalkiom (kreuzfo ha kreuzzevenañ, skorted vestlel, ilgreizel ha pervezel), adaverezh fosfor ha kalkiom e dianlen al lounezhadoù, ar vrazedded hag al laezhañ; askornvlodad ar vugale eo al lec'h (sl. *Looser-Milkman : syndrome de ~, ostéoïde*).

ostéomatosé ◇ **osteomatosi** ◇ **osteomatoz g.** Anez naouus dre furmidigezh osteomou enarzel.

ostéome ◇ **osteoma** ◇ **osteom g.** Yoc'henn guñ an eskern evodet diwar ar gwriad kenglenel askornbaradel o sezañ ent hanbarek war izili traoñ an oadourion yaouank, naouus *ent klinikel* dre laurioù kriz, lec'hiek, muiek en noz, ent skinourel dre un tachad bihan treuzwelus, unel, arfont, unneuziek, gronnet gant an osteoskleroz; dedreiñ a ra gorrek ha pareañ dre ar surjianerezh.

ostéométrie ◇ **osteometry** ◇ **askornventerezh g.** Muzulierezh an eskern; er vizekniezh lezennel da skouer ez arverer *a.* askorn al lez evit desavelañ ar rev.

ostéomyélite ◇ **osteomyelitis** ◇ **askormelfo g.** Poreadur diaser an askorn ha mel an askorn, peurliesañ dre stafilokok aourliv, gwadentoet.

ostéomyélite infectieuse aiguë ◇ **acute osteitis** ◇ **askormelfo lemm** Kleñved o tizhout ar vugale hag ar grennarded, kiriek dezhañ ar stafilokok lineiat, naouus dre danjenn elfennoù kelligel an askorn, an amaskornenn ha kavenn ar mel, lec'hiet er parzh nestalpenn, kevredet gant azonoù hollek grevus, o tedreiñ emdarzh etrezek al linadur (morfer an eskern) ha furmidigezh un amskar.

ostéon ◇ **osteon** ◇ **osteon g.** Unvez luniadel ar steuñvenn stank, anezhi lavnennigoù askorn kengreiz en dro d'ur ganol Havers (sl. *Havers : canal de ~*).

ostéonécrose aseptique ◇ **aseptic osteonecrosis** ◇ **askornvarvennañ anlestel** Marv kelligoù an askorn diwar ameroeriañ, o tedreiñ etrezek pe distruj diwezhel an askorn, pe deloezañ ar gwriad marvennet hag an amsaveñ argammedek anezhañ gant ur gwriad nevezfurmet; *eilvedel* e c'hell bezañ an *a.a.* d'un daraez, d'ar c'haengurañ, d'un enfrou aezhel (kleñved ar c'haelogoù), hematiel (drepanokitoz), kelligel (kleñved Gaucher), pe *kentael* diwar un tromboz pe da heul korzaraezioù arreet ha korrdorroù darvezet e tiriadoù hanbarek (penn ar paler, penn pe skodennoù an askorn morzhed, askorn fer) (sl. *anérombolisme, Gaucher : maladie de ~, ostéochondrite*).

ostéonectine ◇ **osteonectin** ◇ **osteonektin g.** Glikoprotein fosforet o taspertzhañ an askornbarañ dre gendaoliñ da unaniñ kollagen ha kalkiom er gwriad askorn.

ostéopathe ◇ **osteopath** ◇ **1 askornadeg g. -eion 2 osteopat g. -ed** 1 Gouziviad ur c'hleñved askorn. 2 Embregour an osteopatiezh.

ostéopathie ◇ **osteopathia, osteopathy** ◇ **1 askornad g. 2 osteopatiezh b.** 1 Anvad genadel an anezioù askorn. 2 Hentenn yac'haat soliet war an darfiñvadurioù (sl. *chiropraxie, vertébrothérapie*).

ostéopathie de carence ◇ **alimentary osteopathy** ◇ **askornad negezel** Seurtad askornvloedad devoudet gant an diouer kalkiom, fosfor ha vitamin D, naouus dre lauriou ha torrou emdarzh diwar dirazekaat strewek an atel.

ostéopénie ◇ **osteopenia** ◇ **olaskorn g.** Derez diveinelaat an askorn etre ar stad reol hag an osteoporoz.

ostéopériostite, périostite ◇ **osteoperiostitis, periostitis** ◇ **askornamaskornennfo g., amaskornennfo g.** Tanienn lemm pe henek an amaskornenn hag an askorn danlec'h.

ostéopétrose ◇ **osteopetrosis** ◇ **osteopetroz g.** Anaez hêrezhel treuzkaset er mod enkilek pe trec'hek, oc'h erzerc'hañ abred pe abretoc'h, naouus dre a douesadur an eskern daskenek e zerez hag e astenned, o varrañ kavenn ar mel, o tistummañ an eskern hag ouzh o breskaat; da wikefre dezhañ ez eus un direizh a 'n osteoklazif; er furmoù grevus e stader dallentez ha bouzarded dre amwask an nervennoù hag un amwad argreskus ha marvus dre zistruj mel an eskern pe dre wadloezañ felc'hel.

ostéophlegmon ◇ **phlegmonous periostitis** ◇ **askornvorfer g. amaskornennfo morferek** Linadur askorn danamaskornennel gant aloubadur foel ar gwiadou kefin; termen arveret dreist holl evit *a.* ar c'haved devoudet gant poreadur un dant.

ostéophyte ◇ **osteophyte** ◇ **amdeñvenn b. askorn, askorndeñvenn b., osteofit g.** Dedaolad askorn paoterus evodet diouzh an amaskornenn e kefin ur c'henvell klañv pe un askornfo henek; a-wechoù ivez e tisoc'h eus aloubadur ur stagell gant ar gwiad askorn.

ostéophytose ◇ **osteophytosis** ◇ **osteofitoz g.** Anaez naouus dre zispakadur amdeñvennoù askorn.

ostéoplasie ◇ **osteoplasia** ◇ **askornwe g.** Nevezwe askorn anrizhek.

ostéoplastie ◇ **osteoplasty, osteoplasis** ◇ **askornatelviñ** Gwezh surjanel renet evit dazluniañ un askorn diwar-bouez imboudennoù askorn pe dafar osodel; *askornatelviñ amaskornennel* (Gl. *o. périostique*) a reer eus un araezad oberatael amkanet da zec'han gwiad askorn adal drailhennou amaskornenn treuzplantet.

ostéopécilie, ostéopathie condensante disséminée ◇ **osteopécilia** ◇ **osteopekiliezh b., askornad douesaus strewek** Anaez hêrezhel treuzkaset er mod trec'hek, hep arouezioù klinikel, erzerc'h war ar skinklunioù dre ur strewad enezigoù doues war an tachadoù spoueek (talpennoù an eskern hir) ha rizennoù saezhennek war askell askorn al lez (sl. *Voorhæve : maladie de ~*).

ostéopromalacie ◇ **osteoporosis with osteomalacia** ◇ **askornrouezad gant askornvloedad, askornrouezvloedad g.** Diveinelaat hollek an eskern, kevredet gantañ tanavadur an anneauenn broteek ha skorted al lenadur outi eus ar fosfor hag ar c'halkiom.

ostéoporose ◇ **osteoporosis** ◇ **askornrouezad, osteoporoz g.** Tanavaat anneauenn broteek an askorn, erzerc'h, *ent klinikel*, dre lauriou (dreist holl e par al livenn vrusk-dargreiz, sez choukadur ar melloù), an andrafted, distummadurioù hag, a-wechoù, torrou a 'n eskern; *ent skinourel*, dre sklaerded skeudenn an eskern, anatoç'h o c'hourzadoù eget en eskern bonan; *ent wiadurel*, dre ledanaat kavennou ar mel ha skoanadur ar c'hourzadoù; e dianlen strafuilhoù kennevid ar protid dreist holl e vez an *a.* : 1) *skorted an enankañ pe ar sugañ* : *a.* dianvizpaouezel, *a.* kozhiadel, *a.* an anaezioù koazhadel (kreuzzevenañ, kirroz, druzoul hennadek), *a.* an diabet, *a.* an hemokromatoz; 2) *reñver an ec'hankadoù* : *a.* kleñved Cushing, *a.* kleñved Basedow, *a.* diwar diounezadur hirbad kortikoidoù, *a.* da heul diloc'hekaat (sl. *fragilité osseuse héréditaire, ostéopénie, ostéo-densi(to)métrie, ostéomalacie, ostéopromalacie*).

ostéoporose algique post-traumatique ◇ **Sudeck's atrophy** ◇ **askornrouezad laurek diandaraez** Furm askornrouezad kevredet gant lauriou, andrafted hag alies strafuilhoù gwazhiedloc'hadel (dulaz, gouliñvoù) o tarvezout un nebeut sizhunvezhioù goude un daraez e parzhioù kefin an atel (sl. *algodystrophie sympathique, névrite ascendante, Sudeck : atrophie de ~*).

ostéoporose juvénile idiopathique ◇ **idiopatic juvenile osteoporosis** ◇ **askornrouezad yaouerel hennadek** Furm askornrouezad dianav he arbenn, oc'h anadiñ er vugeliezh hag o tedreñ dre gizañ.

ostéopsathyrose, maladie des hommes de verre ◇ **osteopsathyrosis** ◇ **osteopsatiroz g., kleñved an dud hedorr** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, erzerc'h adal ar bugelvezh kentañ, naouus dre vreskted an eskern, ar re-mañ o tertiñ diwar an disterañ horos, dre danavadur an eskern plat (distummadur ar c'hlopenn), livrezh glas al lersaeoù, a-wechoù strafuilhoù klevedel hag enborc'hadel; kizañ a ra peurliesañ ha steuziañ d'ar c'hrennoad; anezhañ an 90 % eus degouezhioù an askornbarañ diglok (sl. *fragilité osseuse héréditaire, Van der Hæve et de Kley : triade de ~*).

ostéoradionécrose ◇ **osteoradionecrosis** ◇ **askornskinvarvennañ** Marvennañ gwiad kenglenel an askorn e dianlen an arlo-adur skinoù X, radiom, danvezioù skinoberiek.

ostéosarcome, sarcome ostéogénique ◇ **osteosarcoma** ◇ **osteosarkom g., sarkom g. askornbaradel** Sarkom evodet diouzh ar gwiad askornbarañ, a zeskriver tri seurtad anezhañ hervez e boent deraouiñ : 1) *o. kreizel pe diarvelel*, o kregiñ er mel hag o tispakañ e-barzh talpennoù an eskern hir hag e gwiad spoueek an eskern all; 2) *o. trobarzhel pe amaskornennel*, o tispakañ dreist holl e par an treuzennoù diwar goust talbenn don an amaskornenn; 3) *o. araskornel*, evodet diouzh talbenn diavaez an amaskornenn; hervez tued loezañ pe dedaoliñ ar c'hankr e reer kel eus *sarkomou askornloezus* hag eus *sarkomou askorneiat* (sl. *ostéochondrosarcome*).

ostéosclérose, éburnation ◇ **osteosclerosis** ◇ **osteoskleroz g., ivorekaat** Anaf naouus dre devadur ha douesadur lec'hiek pe hollek ar c'hourzadoù askorn ha strishadur kavennou ar mel; un osteoskleroz hollek eo an osteopetroz (sl. *ostéopétrose*).

ostéose ◇ **osteosis** ◇ **osteoz g.** Anaf anfoel an eskern.

ostéose cancéreuse ◇ ◇ **osteoz kankrel** Anafou midañ war atel kankreion 'zo, ha pa ve pe get tizhet an eskern gant an hanwe.

ostéose condensante iliaque bénigne ◇ **osteitis condensans ilii** ◇ **osteoz douesaus kuñv askorn al lez** Douesadur al lodenn nes-kroazell eus askorn al lez, daouduek peurliesañ, laurus a-wechoù, a stader war ar vaouez yaouank goude ur gwilioud diaes pe un daraez.

ostéose fluorée ◇ **fluorosis of bone** ◇ **osteoz fluorel, fluoroz g. an eskern** Askornad diwar bistradur henek dre haliou fluor a orin dourdalañvel pe greantel, erzerc'h ent skinourel dre vuiaour hollek demerez an atel dre benn un osteofitoz enaskornel hag endan-amaskornenn.

ostéose (hyper)thyroïdienne, ostéose thyroéogène ◇ **thyroid osteosis** ◇ **osteoz skoedennien** Askornrouezad laurus kenan a-geñver gant ar skoedusvorc'h, o paouez a zedreñ da heul ar skoedennezvenañ nemetken.

ostéosynthèse ◇ **ostéosynthesis** ◇ **kesteudañ (askorn), kesteudad g., askorngesteudañ** 1 Ratreañ sezenn un torr dre arez tachou, serjantou, biñsou, neudennou pe plakennoù metal, a zilezer e-barzh ar gwiadoù pe a zilamer goude ur prantad (*kesteudad padennek*, Gl. *o. temporaire*). 2 Gwezh surjanel amkanet da glaviañ ur c'henvell (droug Pott, askornfo torzhellek lemm) (sl. *ankyloser*).

ostéotomie ◇ **osteotomy** ◇ **askornenbenañ** Skejañ surjanel un askorn hir.

ostéotuberculose, ostéite tuberculeuse ◇ **tuberculous osteitis** ◇ **askornfo g. torzhellek** Tanijenn ar gwiad askorn diwar boreadur gant bazhilli Koch, dezhi lies furm : ensilad, mallez, spina ventosa, askornfo torzhellek lemm (sl. *carie 1*, *Pott : mal de ~, spina ventosa*).

otalgie, otodynie ◇ **otalgia, otodynia** ◇ **skouarnost b.** Laur er skouarn.

Othello : syndrome d'~ ◇ **Othello's syndrome** ◇ **azoniad Othello** Ambredañ kleñvedel difealded ar pried, furm an ambren warizi a zo hini penndudenn tragedi Shakespeare "*Othello, the Moor of Venice*".

othématome ◇ **othaematoma** ◇ **plegwatoñv g.** Gwatoñv e-barzh pleg ar skouarn.

otique ◇ **otic** ◇ **skouarnel aa.** A-zave d'ar skouarn.

otite ◇ **otitis** ◇ **skouarnfo g.** Tanijenn lemm pe henek ar skouarn; lies seurtad a zeskriver : 1) *s. diavaez* (Gl. *o. externe*), tanijenn ode diavaez ar c'hleved; 2) *s. diavaez gourc'hennus* (Gl. *o. externe desquamative*), anaez an ode diavaez hag an daboulin naouus dre ur gourc'hennañ paoterek hag ar furmiñ stevioù epidermel don, pegus, en arez da zarallañ ar c'hleved; 3) *s. diabarzh* (Gl. *o. interne*), tanijenn kentaal pe eilvedel ar skouarn diabarzh; 4) *s. milendalle* (Gl. *o. labyrinthi-que*) (sl. *Ménière : maladie pe syndrome de ~*); *s. krenn* (Gl. *o. moyenne*), tanijenn kavenn an daboulin; 5) *s. krenn kendiñvus* (Gl. *o. moyenne adhésive*), skouarnfo krenn henek erzerc'h dre furmidigezh gwriad stirek, o tevoudañ heugennou, trolern ha bouzarded; 6) *s. askornspouee* (Gl. *o. ostéospongieuse*), skouarnfo krenn henek o tizhout ar vaouez da vare ar gaezouegezh a-geñver gant miarc'hwel an arskoedennou, naouus dre ur vouzarded daoudu kentrat; dedreñ a ra dre resmiadoù askornfo o wazhañ speur ar milendall; 7) *s. levrglaourek* (Gl. *o. séromuqueuse*), naouus dre ur fennad e-barzh ar skouarn greñn kuit a nep arouez poreadur lemm.

oto-rhino-laryngologie, ORL ◇ **ear-nose-throat, ENT, otorhinolaryngology** ◇ **skouarnfrigarloc'hennouriezh b., SFG** Arbennigiezh vezegel o plediñ gant an aerforzhioù uhelañ : fri, korzailhenn, divskouarn, garloc'henn (sl. *auriste, otologie*).

otochalasis ◇ ◇ **flipezennusgad g.** Laoskaat flipezennoù an divskouarn gant isteñv an amwiskadoù.

otoliquorrhée ◇ **cerebrospinal fluid otorrhoea** ◇ **skouarnliñvenver g.** Naouez liñvenn benn-kein dre ar skouarn.

otolithe, statoconie ◇ **otolith, statoconium** ◇ **otolit s., statokoni s.** Strinkenn razek vihan loet e-barzh kennenn otolitek ar skouarn diabarzh ma tifourc dibennoù nervern ar sac'hig hag an nervern grozhig-gloestr; roll an *o.* eo kendaoliñ da zerc'hel kempouez ar c'horf (sl. *macule*).

otolithisme ◇ ◇ **otolitegezh b.** Azoniad o c'hoarvezout eus un trolern feuls gant kouezh, hep koll kenskiant na c'hweliñ; displeget e vez dre hegeuz ar benvegad otolitel hep keñver gant trolern Ménière.

otologie ◇ **otology** ◇ **skouarnouriezh b.** Diskiblezh o plediñ gant an divskouarn hag ar c'hleñvedoù anezho (sl. *auriste, oto-rhino-laryngologie*).

otomastôidite ◇ **otomastoiditis** ◇ **skouarnbrennigennfo g.** Tanijenn ar skouarn greñn astennet d'ar vrennigenn.

otomycose ◇ **otomycosis** ◇ **skouarnvikoz g., otomikoz g.** Anaez ar skouarn diavaez pe ar skouarn greñn (ha kelli ar vrennigenn) diwar arvevadezh ur foue (peurliesañ eus ar genadoù *Aspergillus* pe *Candida*), naouus peurliesañ dre un deroù trumm, laurioù kriz, bouzarded damglok hag, a-wechoù, treloezad an daboulin.

otopathie ◇ **otopathy** ◇ **skouarnanaez g.** Anvad genadel anaezioù ar skouarn.

otophyma ◇ **otophyma** ◇ **otofima g.** Usteñv flipezenn ar skouarn leteñvel ouzh ar rinofima.

otoplastie ◇ **otoplasty** ◇ **skouarnatelviñ** Oberatadenn amkanet da zazluniañ pleg ar skouarn distrujet pe disneuziet.

otorragie ◇ **otorrhagia** ◇ **skouarnwadiñv g.** Gwadiñv dre ode diavaez ar c'hleved.

otorrhée ◇ **otorhoea** ◇ **skouarnver g.** Anvad rumm an naouezioù o tarvezout dre ar skouarn, ne vern pe natur ha pe orin a ve dezho.

otosclérose ◇ **otosclerosis** ◇ **otoskleroz g.** Seurtad skouarnfo henek daoudu o tizhout kavenn an daboulin hag ar milendall; devoudañ a ra amaskornennfo hag askornfo ha dedreñ ent argammedek d'ar vouzarded.

otoscope ◇ **otoscope** ◇ **otoskop** g. Ardivink evit arsellin ode diavaez ar c'hleved hag an daboulin, ouzh e ober ur spekulom hag ur vammenn luc'h; o. *Toynee* a reer eus ur gorzenn gaoutchoug outi en he daou benn un ambeg olivennek amkanet da generen skouarn ar gouziviad ouzh skouarn ar mezeg; e se, e vez hemañ en araez da verzhout an trouzoù reol pe ezreol, emdarzh pe gwezhiet, o c'hoarvezout e kavenn an daboulin.

otoscopie ◇ **otoscopy** ◇ **otoskopiñ** Anvad rumm an holl araezadoù arveret da erec'hwiliañ ar skouarn (otoskop, spekulom, h.a.).

otospongiose ◇ **otospongiosis** ◇ **otospongios** g. Anaez ganedigel ha hêrezhel, naouus *ent neuziadurel* dre un astenn askornaat eus speur diabarzh kavenn an daboulin (penntir) o vont ent argammedek betek klaviañ arc'hwelerezh ar stleug, *ent klinikel* dre zedro argreskus ur vouzarded daoudu, a-wechoù gant bouderezh; tizhet e vez ar merc'hed dreist holl, ar c'hleved oc'h anaññ d'ar gaezougezh hag o c'hrevusaat da geñver pep bec'hiegi.

ototoxicité ◇ **ototoxicity** ◇ **skouarnbistriusted** b. Pistriusted ouzh ar benvegad klevout, ent spisoc'h ouzh eizhvet daoudañv an nervennoù a-glopenn (n. *rakkambr-melc'houedenn*) (sl. *nerfs crâniens*).

Ouchterlony : méthode d'~ ◇ **Ouchterlony test** ◇ **prouad** g. **Ouchterlony** Araezad dinoñ an hangaegemplezhoù el liñvennoù bevel dre zierc'hiñ en ur metoù gelekaet dre araez kedrann C1q ar glokaenn (sl. *immunodiffusion*).

1 ouraque 2 ouraque, ligament ombilical médian, TA plica umbilicalis mediana ◇ **1 ourachus 2 median umbilical fold** ◇ **1 ourak** g. **2 pleg avegel kreizer** 1 Kanol droazh ar grouell, anezhi hanrann bellek an allantoid, o keneren ar begel ouzh krec'h ar c'hwezhiell. 2 Dre anforzhekaat, e ser diorreadur ar grouell, ez a an ourak d'ur funig, ar pleg a-vegel kreizer.

outrage public à la pudeur ◇ **sexual offence** ◇ **dismegañ foran ar gouez, darwantad** g. **revel** (Mezekniezh lezennel) real, jestr pe emzalc'h, revel e ster, graet en ul lec'h foran, o trozañ reolennoù degemeret ar gouez ha, dre se, kospadus (sl. *attentat à la pudeur, viol*).

NOTENN : Kevatal e vez lakaet ivez Sz. *sexual offence* da Gl. *attentat à la pudeur*.

ouvriers des silos : maladie des ~ ◇ **silos filler's disease or lung** ◇ **skeventad** g. **ar siloerion** Anaez skevent gant ar vicherourion bet e-barzh ar siloioù greun en deizioù goude o leuniadur ha dewentet ganto an dioksidenn nitrogen o sevel diwar goidigezh ar greun, en ervez da zedreñ d'ar marv dre c'houliañ skevent kentrat pe, a-barzh 2 pe 3 sizhun, dre gorrvronkezh fibroseiat anforzhus.

ovaire ◇ **ovary** ◇ **vierz** b. **-ioù** Gwagrenn c'hanadel benevel daoudañvat loet el lestr, o piaouañ arc'hwelioù war un dro ezvorc'hadel (*vibarañ*, sl. *ovogenèse*) hag enborc'hadel (sl. *œs-trogènes : hormones ~, progestérone*).

ovaires polykystiques : maladie ou syndrome des ~ ◇ **polycystic ovarian disease** ◇ **kleñved pe azoniad ar viereziou lieskistek** Anaez naouus, *ent neuziadurel* dre vuiadur ec'honad ar viereziou a zo enno lies kist endan-gaenenn hag uswe ar gwriad entremezel tro-volc'henn (toag diabarzh), *ent klinikel* dre ar greoñegezh ha mizioù ezreol pe ezvezant), *ent vevoniell*, ent daskenek, dre vuiadur an hormonou luteotrof hag androgen.

ovalbumine ◇ **ovalbumin** ◇ **ovalbumin** g. Albumin ar gwenn vi.

1 ovalocytose 2 ovalocytose, anémie ovalocytique, maladie de Dresbach ◇ **ovalocytosis** ◇ **ovalokitoz** g., **amwad ovalokitel, kleñved Dresbach** 1 Bezañs ovalokit (hemati viheñvel) er gwad. 2 Kleñved hêrezhel dibaot naouus dre vezañs ovalokit er gwad amredat ha resmiadoù gwadloezañ.

ovariectomie, oophorectomie ◇ **ovariectomy** ◇ **vrierezevenañ** Dilemel surjanel un pe an div vieriez; termen arveret dreist holl da arouezñ ezvenidigezh klok ur c'hist a 'r vieriez.

ovarien : cycle ~ ◇ **ovarian cycle** ◇ **kor** g. **ar vieriez** Kemalad lankadoù erolet gant bolc'henn ar vieriez e-doug 28 devezh ar c'hor miziaouel dre zelanvad hormonou gonadwezher ar c'horgorfenn (sl. *mens-truel : cycle ~, œstral : cycle ~*).

ovariocèle ◇ **ovariocele** ◇ **vierzogad** g. Avelenn ar vieriez.

ovariolyse ◇ **vierzegzlenañ** Dizalc'hediñ surjanel ar viereziou diouzh glenelloù an ampeleñ.

ovariopexie ◇ **ovariopexy** ◇ **vierzAanlenañ** Festañ surjanel ar vieriez.

ovarioprive ◇ **ovarioprival** ◇ **olvierzel** A-zave da ezvezañs ar vieriez, goude ezvenañ pe d'an anarc'hwel anezhi.

ovariothérapie ◇ **ovariotherapy** ◇ **vierzkurañ** Arver yac'hadel angevezhioù vieriezel.

ovarite ◇ **ovaritis** ◇ **vierzfo** g. Tanienn ar vieriez, kevret alies gant ur c'horzennfo; *vierzfo sklerokistek* (Gl. *ovarite sclérokystique*), termen distaolet, a raed eus *mideñv ar vieriez* (Gl. *dystrophie ovarienne*).

oversuppression : syndrome d'~ ◇ **oversuppression syndrome** ◇ **azoniad gourastal** Mizanliñv o tarvezout gant merc'hed o deus paouezet a gemer un hilastaler, o padout a-wechoù lies mizvezh.

oviparité ◇ **oviparity** ◇ **vic'hanerezh** g. Mod gouennañ ma tiorre ar rizhell diwar ur c'hadavad loet ebarzh ur vi bet dozvet ha n'eo ket diwar goust bevedeg ar vamm.

ovisac ◇ **ovisac** ◇ **visac'h** g. Kennenn ar volc'henn vieriez azv (sl. *follicule de De Graaf*).

ovo-implantation ◇ **ovoimplantation** ◇ **vienglenañ** Festañ ar vi speriet ouzh speur ar grozh, o c'hoarvezout etre 5 ha 15 devezh goude ar frouezhigñ; poent derouñ ar vrazzeded eo.

ovoculture ◇ **embryonate egg culture** ◇ **vidiñvañ** Hentenn diñvañ viruzoù 'zo pe bakteri 'zo (*Rickettsiaceae*, *Chlamydia-ceae*) e-barzh ur vi yar rizhellek goude enkorañ un danvezenn vevedel (gwad, naouezenn) er sac'h kadoanel, e kavenn an amnion, e kavenn an allantoid pe war ar gennenn gorioallantoidel.

ovogenèse ◇ **ovogenesis** ◇ **vibarañ** Furmiñ ar vigelligoù, lies lankad ouzh e ober : er vierrez, ez emrann ar vongellig venevel (kenti pe ovogonienn) o tec'han an ovokit a gentañ urzh, diploidel; kreskiñ a ra ar re-mañ, karget gant kadoan magus, azviñ ha, dre ur meoz, dedaoliñ an ovokit a eil urzh (haploidel); emrannañ a ra ar remañ d'o zro ha dedaoliñ ar vigelligoù.

ovotestis ◇ **ovotestis** ◇ **ovotestiz g.** Gonad o c'hoarvezout eus gwiadoù vierrezel ha klidennel en ardouesk (sl. *hermaphrodisme*).

ovulation ◇ **ovulation** ◇ **vic'hadiñ** Dozviñ vierrezel : ezvoulc'hañ ar visac'h ha dilaoskiñ ar vigellig.

ovulation sidérée : **syndrome de l'~**, **syndrome du follicule persistant** ◇ ◇ **azoniad ar vic'hadiñ darviget**, **azoniad ar volc'henn dreistpadus** Mideñv kistel ar vierrezoù naouus dre an ezvezañs vic'hadiñ ha furmiñ a r c'horf melen ha dre zrestpad ur volc'henn gourborc'hus, erzerc'h ent klinikel dre ar mizanliñv hag ar c'hrozhwadliñv.

ovule ◇ **1 ovum** **2 vaginal suppository, pessary** ◇ **1 vigellig b. 2 ovulenn u.** 1 Dedaolad termen ar vibarañ, kellig ouennañ (gamet) benevel, en araez da vezañ frouezhiget gant ar spergellig (sl. *ovogenèse*). 2 Anvezhz apotikel viheñvel amkanet da vezañ entoet er gouin.

oxalémie ◇ **oxalaemia** ◇ **1 gwadoksalegezh b. 2 oksalwadvec'h g.** 1 Bezañs trenkenn oksalek e rezh oksalatoù er gwad. 2 Feur trenkenn oksalek er gwad; 5 mg/l eo feur reol an *o.*; oksalwadusvec'h a stader gant an urloù, an diabet, ar c'hrouanegezh lounezhel ha gant remmoù 'zo.

oxaligène ◇ ◇ **oksalbar aa.** A zo en orin an drenkenn oksalek enaozet gant ar bevedeg : bouedoù oksalbar eo ar glukid, an nukleoproteinoù hag amindrenkennoù 'zo.

NOTENN : Kemm a lakaer etre *oksalbar* hag *oksalenanker* (Gl. *oxalophore*), "a zo ennañ trenkenn oksalek : kakao, te, pebr, triñchin, h.a."

oxalique ◇ **oxalic** ◇ **oksalek aa.** A-zave d'an drenkenn oksalek [(COOH)₂] pe d'he halioù.

oxalose ◇ **oxalosis** ◇ **oksaloz g.** Anaez dibaot o tizhout ar vugale dreist holl, hêrezhel damasur, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, naouus *ent neuziadurel* dre ur c'hoc'hionadur strinkennoù oksalat kalkiom e-barzh al lounezhi hag organoù all, *ent klinikel* dre ur c'hrouanegezh troazhel oksalek, a-wechoù kevret gant strafuilhoù an diorreadur hag un nefrokalkinoz o tedreiñ etrezek ar marv dre skorted lounezh urewadusvec'hel hag akidozel.

oxalurie ◇ **oxaluria** ◇ **1 troazhoksalegezh b. 2 oksaldroazhvec'h g.** 1 Bezañs e-barzh an troazh eus trenkenn oksalek e rezh oksalat kalkiom ha, dibaotoc'h, magnezium ha natriom. 2 Feur an oksalatoù ezvevennet dre an troazh; ent reol emañ an *o.* etre 0,010 ha 0,025 g (etre 79 ha 159 µmol) dre 24 h.

Oxford : **unité ~** ◇ **Oxford unit** ◇ **unanenn b. Oxford** Unanenn arveret da arouezañ gwerederezh ar penikillin; ar c'hementad izek penikillin mesket gant 50 mL anvervad, en araez da heudiñ kresk un diñvadenn stafilokok aourliv, eleze 0,6 µg.

oxycarbonémie ◇ ◇ **1 gwadoksikarbonategezh b. 2 oksikarbonwadvec'h g.** 1 Bezañs monoksidenn garbon er gwad. 2 Feur ar vonoksidenn garbon er gwad, reol etre 0,13 hag 1,3 %.

oxycarbonisme ◇ **carbon monoxide poisoning** ◇ **oksikarbonategezh b.** Pistriadur dre ar vonoksidenn garbon (CO), lemm (darvoud, argezhiaed emlazhañ) pe henek (butuneegezh); dre ma 'z eo krafusoc'h ar CO eget an oksigen ouzh an hemoglobin, e kemer ar c'harboksihemoglobin lec'h an oksihemoglobin, o tevoudañ anoksiez ar gwiadoù; mont a ra arouezioù an *o.* adalek ar c'hlopennad betek ar c'homa; prederiet e vez an *o.* dre an oksigengurañ uc'hamwask (sl. *carboxyhémoglobine, monoxyde de carbone*).

11-oxycorticostéroïdes ◇ **glucocorticoids** ◇ **11-oksikortikosteroidoù l. (g.)** Stroll steroidoù borc'het gant tachad hordennaouek ar gaenuslounezhenn, naouus dre vezañs un oksigen lenet ouzh 11t karbon ar graoñell steroidel, ouzh e ober ar *c'horticosteron*, an *11-dehidrokortikosteron*, ar *c'hortizol* (pe *hidrokortizon* pe *17-dehidrokortikosteron*), ar *c'hortizon* (pe *17bdhidroksi-11-dehidrokortikosteron*, hormonoù holl a vez ganto gweredoù war ar c'hennevid : treuzfurmiñ proteinoù ar gwiadoù e glikogen ha lenañ hemañ ouzh an avu, muiaat ar gwadvec'h glukoz; blivaat eznevid ar protid ha devoudañ isteñv an organoù limfoïdel hag isriñv al limfokit, isteñv ar c'higennoù hag an osteoporoz; strafuilhañ kennevid al lipid (muiaat ar gwiad behinel); skoilhañ ouzh furmidigezh an antikorfoù; arveret e vezont er yac'hadouriezh evit o gwered galloudek enepfo hag eneballergek; ezvevennañ troazhel an *11-o bloc'hel* zo etre 8 ha 15 mg dre 24 h gant ar gwaz, etre 5 ha 10 mg gant ar vaouez; ezvevennañ troazhel ar *17-OH kortikoidoù* zo etre 4 hag 8 mg (e rezh kortizol) dre 24 h gant ar gwaz, etre 2 ha 5 mg gant ar vaouez (sl. *corticossurrénal hormones ~es*).

oxydase ◇ **oxidase** ◇ **oksidaz g.** 1 Enzim o vliaat an oksigen, sk. : ar *c'hitokromoksidaz*, blivaer o tezougen elektron d'an oksigen. 2 Enzim o treuzfurmiñ un danvezenn en unan all dre lenañ oksigen, sk. : an *aminoksidaz*, a dreuzfurm an aminoù en aldehidoù.

oxydation ◇ **oxidation** ◇ **oksidañ, oksidader g., oksiderezh g.** Kediañ kimiek e tazgwered drezañ ur c'horf (an *direr*, Gl. *réducteur*) ouzh an oksigen dre geflezel gantañ un niver elektron; dre astenn ster, pep dazgwered o c'hoarvezout eus un treuzdoug elektron eus ur c'horf (an *direr*) d'ur c'horf all (an *oksider*, Gl. *oxydant*); pep oksidañ zo enta war un dro un diren, alese arver an termenoù *oksidañ-diren* pe *oksidoreduktiñ* (Gl. *oxydoréduction*) (sl. La-16 380-381).

- oxyde nitrique** ◇ **nitrogen dioxide** ◇ **dioksidenn** b. **nitrogen** Aezhenn hegus a zo he delun NO₂, enaozet er bevedeg adal an L-arginin dre araez un enzym, an NO-sintaz (Gl. *NO-synthase*); dasperzhiañ a rafe en anadennoù gwazhiedloc'hadel hag ivez en nervdreuzkas goude sinapsel.
- oxydone** ◇ **oxidase-like enzyme** ◇ **oksidon** g., **oksidazvan** g. Enzim en araez da zezougen oksigen evel ma ra an oksidazoù, nemet a zo dourandilezh; bezant e vez an *o.*, bresk pe stabil, er gwiadou loenel.
- oxydoréductase** ◇ **oxidoreductase** ◇ **oksidoreduktaz** g. Enzim o treluskañ an dazgweredoù oksidañ-diren, sk. : an *dez-hydrogenazoù*, an *oksidazoù*, ar *peroksidazoù*, ar *c'hatalazoù*.
- oxydoréduction**, **redox** ◇ **oxidation-reduction**, **redox** ◇ **oksidañ-diren**, **oksidoreduktiñ**, **redoks** g. Dazgwered kimiek o c'hoarvezout eus un treuzdoug elektron (sl. *oxydation*).
- oxygénase** ◇ **oxygenase** ◇ **oksigenaz** g. Enzim en araez da lenañ oksigen ouzh ar molekul dour (sl. *eau oxygénée*).
- oxygénation** ◇ **oxygenation** ◇ **oksigenañ**, **oksigenadur** g. Oksidañ un danvezenn dre lenañ outi oksigen.
- oxygène** ◇ **oxygen** ◇ **oksigen** g. Elfenn gimiek niver tolz 16, niverenn atom 8 (8 elektronenn en dro da zerc'h an atomenn), arouez O, dazgweredus kenan, en araez da gediañ gant hogos an holl elfennoù kimiek; kedrann eo an elfenn oksigen er c'horfoù pur *oksigen* (pe, spisoc'h, *dioksigen*) (O₂) hag *ozon* (O₃); aezhel en azoioù ordinal, ez eo an O₂ unan eus parzhadoù pennañ an aer ha gantañ e vez ur roll a bouez en anadennoù oc'h amplegañ analerezh ar bevion.
- oxygène : capacité du sang en ~**, **pouvoir oxyphile** ou **oxyphorique du sang** ◇ ◇ **oksigenvec'hiusted** b. **ar gwad**, **oksigenwadvec'hiusted** b., **barr oksifilek** pe **oksigforek ar gwad** Kementad uc'hek oksigen emañ ar gwad en araez da lenañ, ent reol 20,5 mL O₂ evit 100 mL gwad; lenet e vez hogos an holl ouzh an hemoglobin, ul lodenn vihan (0,36 mL) o vezañ dileizhet er plasma.
- oxygène : coefficient d'utilisation de l'~** ◇ ◇ **gwezhiader danveziñ an oksigen** Keñver an diforc'h talmerel-gwazhiennel ouzh ar gwadvec'h oksigen × 100; ent reol e vez an diforc'h par da 0,05 mL, ar gwadvec'h par da 0,19 mL hag ar gwezhiader par da (0,05/0,19) × 100 = 26 %; pa dreuz ar gwad un organ dezalc'hidik ouzh an oksigen, pa sav enta a-us da 0,05 mL an diforc'h talmerel-gwazhiennel, e vez muiaet ar gwezhiader; ar muzul eo eus an erlamad oksigen gant ar gwiadou eroueriet.
- oxygène : concentration ou contenance ou teneur en ~** ◇ **blood oxygen content** ◇ **gwadvec'h** g. **oksigen**, **oksigenwadvec'h** g. Feur O₂ lenet ouzh ar gwad, ent reol 19 mL dre 100 mL gwad talmerel, etre 13 ha 14 mL dre 100 mL gwad gwazhiennel.
- oxygène : consommation d'~** ◇ **oxygen consumption** ◇ **beveziñ oksigen** Feur O₂, dewerzhet e rezh mililitroù dre vunud, desunet gant ar gwad oc'h amredañ e korrwazhied al logigoù skevent (*ec'hongas oksigen*, arouez *V_{o 2}*) ha bevezet er gwiadou (arouez *Q_{o 2}*), ent reol par da 250.
- oxygène : dette d'~** ◇ **oxygen debt** ◇ **dle** g. **oksigen** Ent reol e vez kempouez etre enankañ analadel an oksigen hag ar bevezadur anezhañ gant ar bevedeg; anv a reer eus digempouez, da geñver ar strivou da skouer, pa zarvez d'an ezhomm oksigen kreskiñ buanoc'h eget an enankañ; gant ar paouez e teu ar c'hempouez en-dro buan pe buanoc'h ha “dastalet e vez an dle”.
- oxygène : différence artérioveineuse en ~** ◇ **arteriovenous oxygen difference** ◇ **diforc'h talmerel-gwazhiennel ar gwadvec'h oksigen** Ent reol e vez an diforc'h gwadvec'h oksigen etre an talmerennoù hag ar gwazhiennoù 0,19 mL – 0,14 mL = 0,05 mL evit 1 mL gwad; rezhiennañ a ra ar c'hementad oksigen degaset gant ar gwad d'ar gwiadou; *ec'hongas an oksigen* (Gl. *débit d'oxygène*) zo par d'an diforc'h talmerel-gwazhiennel liesaet dre ec'hongas ar galon : 0,05 × 5 000 mL = 250 mL/min.
- oxygénopexie** ◇ ◇ **oksigenlenañ** Kediañ an oksigen ouzh ur c'horf all, sk. : galloud oksigenlenañ an hemati (sl. *oxyphile*).
- oxygénothérapie** ◇ **oxygenotherapy** ◇ **oksigengurañ** Arver yac'hadel an oksigen; *o. uc'hamwask* (Gl. *o. hyperbare*, Sz. *hyperbaric oxygenation*).
- oxyhéoglobine** ◇ **oxyhaemoglobin** ◇ **oksihemoglobin** g. Furm oksidet a 'n hemoglobin, a c'hell bezañ ec'haozet e *globin*, albumin diliv, hag hem, livegenn houarnin gell.
- oxylogie, médecine d'urgence, urgentologie** ◇ **emergency medicine** ◇ **trummadouriezh** b. Skourr ar vezekniezh o plediñ gant ar gwezhiadennoù diwar zifrae (sl. *réani-mation*, *SAMU*, *urgences*, La-09 331-332).
- oxymétrie** ◇ **oximetry**, **oxymetry** ◇ **oksigenventañ**, **oksimetriñ** Dezventañ ar c'hementad oksigen bezant en un aezhenn pe en ul liñvenn, da skouer er gwad; dewerc'het e vez dre un hentenn gimiek (dezventañ ec'honadel) pe dre un araezad fizikel, diwar-bouez un oksimetr dre luc'hgell o keñveriañ skalfadoù lugañ an oksihemoglobin hag an hemoglobin direet, muzul hemañ a c'haller ren antrewan (*o. treuzkroc'henel*, Gl. *o. transcu-tanéé*) (sl. *polysomnographie*).
- oxyosmie** ◇ **oxyosmia** ◇ **gourc'hwesha** Kizidigezh ar c'hwesha bras hep bezañ ezreol; da ziforc'hiñ diouzh an *usc'hwesha* (sl. *hyperosmie*), anadenn gleñvedel.
- oxyphile** ◇ **oxyphil** ◇ **oksigenlen** aa., **oksil** aa. Lenidik ouzh an oksigen.
- oxyphillique** ◇ **oxyphilic** ◇ **oksigenlenañ**, **oksilfilek** aa. Gant ar perzh lenañ an oksigen (sl. *oxygène : capacité du sang en ~*).
- oxyphorique** ◇ **oxyphoric** ◇ **oksigfore** aa. Gant ar perzh dezougen an oksigen.

oxytétracycline ◇ **oxytetracycline** ◇ **oksitetrakiklin** g. Bevastaler eus stroll an tetrakiklineier douhennet eus un aktinomiket (*Streptomyces rimosus*), gwezhus ouzh lies hadenn (strepokok, stafilokok, pneumokok, meningokok, gonokok, treponem gwel, amoeb an dizenteri).

oxyurase, **oxyuriasis** ◇ **oxyuriasis** ◇ **oksiurias** g. Kleñved devoudet gant an oksiu, lec’hiet peurliesañ er pervez, a-wechoù er c’harbedenn, er gousac’h hag en divvorzhed pa emdizh di ar pazed.

oxyure ◇ **oxyuris** ◇ **oksiur** s. *Enterobius vermicularis*, preñved eus urzhad an Nematod, kerentiad an *Ascarides*, etre 4 ha 9 mm hed hervez ar revelezh, arvevaded er ganol vezhur.

ozène, **rhinite chronique fétide** ◇ **ozena** ◇ **ozen** g., **frifo** g. **henek louvus** Anaez glaourgenn ar fri, da azon pennañ anezhañ ar flae taolet gant an divfron; stadañ a reer isteñv ar glaourgenn hag an askorn danlec’hiet, ur glaourlin ha trouskennoù gell o c’holeiñ speur kavenn ar fri; gwezher an *o.* a ve *Klebsiella ozenae* (sl. **cacosmie**, **cacostomie**).

ozone, **trioxygène** ◇ **ozone**, **trioxygen** ◇ **ozon** g., **trioxygen** g. Seurtad polimer allotropek an oksigen, a zelun O₃; en aoziou ordinal ez eo an *o.* un aezhenn frondus a livrezh glas; distabil, ez ec’haoz o treiñ e dioksigen O₂ hag en oksigen unatomennek O; hemañ, kediedik kenan, zo furm oksidusañ an oksigen, en araez da zispenn an danvezennoù bevedel (kaoutchoug, livuzennoù ha gwadoù bev); arveret e vez an *o.* er greanterezh evel gwezher gwennañ, er vezekniezh evel bakterilazh (*ozongurañ*, Gl. *ozonothérapie*); furmet dre wered al luc’hed hag ar fuladoù tredan, ez eo bezant an O₃ a feurioù izel (4/10¹⁴ molekul) en aer a analomp; dousesoc’h e gwiskadoù uhelañ ar stratosfer (1/10¹¹ molekul) ma ampar ar “gwelead ozon” o lugañ skinadoù an heol etre 200 ha 300 nm trohed, e tenn da baotaat er gwiskadoù izel gant niver ar c’hefluskerioù dre vlokañ; sellet e vez evel dañjerus evit ar forzhioù analañ pa sav e aervec’h dreist 1/10⁷ molekul.

P

P : **substance** ou **facteur** ~ ◇ **P substance** ◇ **danvezenn pe parenn P** Enzim popipeptidek bezant en holl wiadoù (nerveg kreiz ha kanol vezhur pergen), oc'h izelaat ar gwask talmerel, o tevoudañ ur gwazhiedfrankaat trobarzh, o vuiaat amdonnegezh ar pervez hag o werediñ evel hanterad kimiek en nerveg kreiz.

PA ◇ **plasminogen activator**, **PA** ◇ **PA**, **blivaer g. -ioù ar plasminogen** Glikoprotein dezhañ un tolz mol e tro 70 000 d hag un hanterhoali berr, borc'het gant endotelienn ar gwazhied, fibrin- ha trombuzloezer, diounezet dre ar wazhienn ouzh an tromboz kurunerel (sl. *profibrinolysine*).

PA : **espace** ~ ◇ **PA interval** ◇ **esaou PA** Entremez etre deroù gwagenn gentezel P ar c'halonvarrwezd gorrekorfel ha gwagenn gentezel herrek ar c'halonvarrwezd enkavennel kentezkofigel dewerc'het diaser; ar muzul eo eus ar ren enkentezel pe godkentezel (etre 35 ha 45 ms); hiraet e vez gant ar mireoù.

1 pacemaker, **centre d'automatisme** **2 pacemaker artificiel**, **stimulateur cardiaque** ◇ **1 pacemaker 2 (cardiac) pace-maker** ◇ **1 broudalf g.**, **kreizenn emgefren 2 adalf g.**, **broudalf kalvezadel**, **tredanfraouaer g. -ioù kalon** 1 Rrannbarzh a 'r galon ma tiwan ent emdarzh ar wagenn vroudañ, er stad reol ar c'hlom god-kentez (sl. *commande instable*). 2 sl. *stimulateur cardiaque*.

pachyblépharose ◇ **pachyblepharon** ◇ **troc'hvalennad g.** Tevadur ar malvennoù.

pachybronchite ◇ **pachybronchitis** ◇ **troc'hvronkezo g.** Anaez henek ar bronkez, naouus, *ent neuziadurel*, dre an tevadur hag ar reuted anezho, *ent klinikel*, dre resmiadoù bronkezo muiek e par ar begelioù hag an diazoù gant ur riskl kankraat er glourgenn treweet.

pachycapsulite ◇ **pachycapsulitis** ◇ **troc'hbourc'hadfo g.** Tevadur foel pourc'had un organ, pourc'had al lounezh pergen.

pachycéphalie ◇ **pachycephalia** ◇ **troc'hglopenn g.** Seurtad dibaot kenan a glopennisvoll, anezhañ tevadur speurioù ar c'hlopenn gant kenaskornad an eskern kitem ha kilpenn (sl. *craniosténose*).

pachychoroïdite ◇ **pachychoroiditis** ◇ **troc'hdolgenusaefo g.** Furm dolgenusaefo ganediged, naouus dre ur gwelead gwiad stirek etre ur grogen askornek hag al liñvenn danluc'hsael.

pachydermie ◇ **pachydermia** ◇ **troc'hgenn g.** Reñver trebad eus tevedd ar c'hroc'hen en e bezh, da heul un uswe stirek entremezel.

NOTENN : Kemm a ginnigan lakaat etre Br. *tevgroc'hen-*, o taveiñ da zoare reol loened 'zo evel an olifanted, ha *troc'hgenn(-)*, anadenn gleñvedel.

pachydermie plicaturée avec pachypériostose de la face et des extrémités ◇ **pachydermoperiostosis plicata** ◇ **troc'hgenn irviok gant troc'hamaskornenn ar fas hag an eizhaennoù** Anaez hêrezhel naouus dre devadur ha krizadur kroc'hen an tal, ar brigenn, ar fas, ar palvoù, tevadur an amaskornenn hag an askorn o tevoudañ un usteñv a 'n eizhaennoù leteñvel ouzh hini an askornarzd usteñvus skeventadien (sl. *dysacromélie, ostéarthropathie hypertrophiante pneumique*).

pachydermie vorticellée du cuir chevelu ◇ **cutis verticis gyrata** ◇ **troc'hvirgenn g. punellat** Nevuz keurel ar brigenn, ennañ asplegoù kroc'hen tev ha kildroennek, etrezo irvi don.

pachyméningite ◇ **pachymeningitis** ◇ **troc'hdevbilhonfo g.** Tanijenn henek ha tevadur a 'r bilhonenn dev; *t. gouzoug usteñvel* (Gl. *p. cervicale hypertrophique*), anaez naouus, *ent neuziadurel*, dre devadur a 'r pilhon ha dreist holl a 'r bilhonenn dev e par rannbarzh ar gouzoug, *ent klinikel*, dre laurioù ha seizioù en izili krec'h (sl. *méninges*).

pachymètre ◇ **pachymeter** ◇ **teventer g. -ioù** Arddivink amkanet da vuzuliañ an tevder, sk. : *t. kornsael* (Gl. *p. cornéen*).

pachyonychie ou **pachyonyxis** ◇ **pachyonychia** ◇ **troc'hivin g.** Tevadur ivinoù an daouarn hag an treid.

pachypleurite ◇ **pachypleuritis** ◇ **troc'hKrezenno g.** Tevadur a 'r grezenn, amparet gant gwiad kenglenel gwazhiedet puilh (stadet peurliesañ e-kerz ar c'hrezennofoioù henek).

pachysynovite ◇ **pachysynovitis** ◇ **troc'hirgenno g.** Tevadur foel irgenn ur c'henvell.

pachytène ◇ **pachytene** ◇ **pakiten** aa. A-zave da drede pazenn kentañ profaz ar meioz pa vez ar c'hromozomoù o verraat hag o tevaat.

pachyvaginalite ◇ **pachyvaginalitis** ◇ **troc'hgouinsaefo** g. Tanijenn henek al levrigen o c'holeiñ ar glidenn (ar c'houinsae).

pachyvaginite kystique ◇ **cystic pachyvaginitis** ◇ **troc'hgouinfo** g. **kistel** Furm gouinfo a 'r vrazezded ma tinod e-barzh begennoù an organ kavennoù kistek levrus hag a-wechoù aezhel.

packing ◇ **packing** ◇ **choukañ** Bandenn lien pe deltenn ensezet, e-doug un dieraeziñ dre zewenterezh, e gargadenn ur gouziviad enpibet, evit parraat ouzh rudadenn ar gwad pe ul liñvenn all e-barzh ar vrian da geñver oberatadennoù war ar fri pe ar genoù (sl. *inondation trachéale*, La-09 180 hh.).

pædomètre ◇ **paedometer** ◇ **pedometr** g. Ardivink amkanet da vuzuliañ savder ar vugale.

Page : syndrome de ~ ◇ **Page syndrome** ◇ **azoniad Page** Teskad arouezioù a-geñver gant miarc'hwel ar c'hreizennoù treuzempennel simpatek ha parasimpatek o tarvezout e-kerz an uswask talmerel gant an dud yaouank : barroù ruzder, ustead kalon, c'hwezadur, anglevadoù enkreziñ ha mougañ.

Paget : maladie de ~ ◇ **Paget disease of the nipple** ◇ **kleñved Paget a 'r beg bronn** Anaev dibaot a 'r beg bronn a stader gant ar merc'hed goude 40 vloaz, naouus dre anafoù kroc'hen ekzemavanek, heuliet gant un ensiladur kankrel argammedek e-barzh ar wagrenn vronn.

Paget : maladie osseuse de ~, ostéite déformante hypertrophique ◇ **Paget disease of bone** ◇ **kleñved Paget a 'n eskern, osteoz disneuzius usteñvus** Kleñved naouus, *ent neuziadurel*, dre usteñv ha krommadur pezhioù 'zo eus an atel endra chom bonan an eskern keñf, *ent klinikel*, dre zisneuziadur ar c'horf : eskern kitem usteñvek, eskern morzhed ha skinoù krommet, lestr arfrank, bruskl arblat, rakwar, azluniadur ar gwiad askorn dre vuiaat an askornloezañ kevredet gant un askornbarañ antrevnek, uswazhiedegezh ar gwiad askorn, laurioù artroz, gwadusvec'h ar fosfatazioù alkaliek ha bezañs hidroksiprolin en troazh ; dianav e chom arbenn ar c'hleñved.

Paget-von Schroetter : syndrome de ~ ◇ **Paget-von Schroetter syndrome** ◇ **azoniad Paget-von Schroetter** Teskad azonoù diwar strafuilh an amred e-barzh gwazhienn ar gazel (da heul un amwask, un tromboz, un andag pe un danijenn gefin), erzerc'h dre un anglevad stennadur ha koeñvadur er vrec'h, ur gouliñv hag alies strafuilhoù teñvel ha gwazhiedloc'hadel, o tedeñ peurliesañ d'ar pare dindan un nebeut mizioù.

pagophagie ◇ **pagophagia** ◇ **skornezadezh** b. Boaz da zebriñ skorn.

palais, TA palatum ◇ **palate** ◇ **stavn** b. Speur grec'h kavenn ar genoù, ouzh he ober ul lodenn araok askornek, ar *s. galet* pe *askornek* (TA *p. osseum*, Gl. *p. dur* pe *voûte palatine*) hag ul lodenn adreñv, ar *s. vlot* (TA *p. molle*, Gl. *p. mou*) pe *gouel stavn* (TA *velum palatinum*, Gl. *voile du p.*), houmañ o tasperzhiañ el lonkañ hag er mouezhparaan ; en astenn d'ar ouel stavn en adreñv emañ an hugenn hag, a bep tu, ar *wareg stavn-teod* (TA *arcus palatoglossus*, Gl. *pilier antérieur du voile du p.*) hag ar *wareg stavn-gargadenn* (TA *arcus palatopharyngeus*, Gl. *pilier postérieur du voile du p.*), etrezo huegoù ar stavn (sl. *luette*).

palatite ◇ **palatitis** ◇ **stavnfo** g. Genaouf lec'hiet er stavn.

palatoschizis ◇ **palatoschizis** ◇ **mizlid** g. ar **stavn** Astennad skarr ar boule'h d'ar stavn askornek.

paleocérébellum ◇ **paleocerebellum** ◇ **paleokerebellom** g. Lodenn a 'n ilpenn a-geñver gant ar forzhioù livenn-ilpenn, o reoliñ an tant diaboz.

paléocortex, paléopallium ◇ **paleocortex, paleopallium** ◇ **paleokorteks** g., **paleopalliom** g. Lodenn ar bluskenn empenn an henañ ent hildarzhel, enni an tachadoù c'hweshael (fronempenn) (sl. *allocortex, isocortex*).

paléopathologie ◇ **paleopathology** ◇ **hengleñvedouriezh** b. Studi ar c'hleñvedoù a c'haller dezren diwar an imboure'h war relegoù an dud hag al loened henamzerel (balzamegennoù).

palette ◇ ◇ **palvenn** b. Plankenig koad e furm ar palv, an dibenn anezhañ rannet etre pemp spletenn a stumm gant ar bizied, o talvoud da zerc'hel ar re-mañ diskalfet en anroadoù 'zo.

pâleur-hyperthermie : syndrome ~ ◇ **Ombredanne syndrome** ◇ **azoniad gwelveded-uswrez** Taolenn glinikel a stader gant ar magadelled un nebeut eurvezhioù goude bezañ oberataet, anezhi gwelveded, trec'hwez, dedro herrek d'ar marv.

palicésie, palikinésie ◇ **palikinesia** ◇ **daradfiñval, daradfiñv** g. Arreata emdarzh hag andiarvenn a 'n un jestr, sk. : luskellañ diastal ar c'horf.

paligraphie ◇ **palingraphia** ◇ **daradskriñval, daradskriv** g. Arreata er skridoù an un bomm, an un gerienn, an un lavarenn.

palilalie ◇ **palilalia** ◇ **daradluzañ, daradluz** g. Strafiuilh ar c'homz o c'hoarvezout eus arreata emdarzh hag andiarvenn a 'n un bomm komzoù, kevret alies gant buanaat argammedek tead an distilh (*komzusteud*, sl. *tachyphémie*), anadenn nes d'an drec'hluzañ a-geñver alies gant gwanadur ar meiz (sl. *écholalie*, La-18 276-278).

palilogie ◇ **palilogy** ◇ **daradkemezañ, daradkemez** g. Furm daradluzañ, anezhi arreata ur frazenn savet reizh heuliet gant ur bomm soniadoù dislenadek.

palindromique ◇ **palindromic** ◇ **daradfeilhañ** aa. Oc'h adfeilhañ lies gwech.

palingnostique : délire ~ ◇ **palingnostic delusion** ◇ **ambren an daraddaznaout** Kammzerc'h arreat ha diastal an daznaout (sl. *déjà vu : phénomène du ~*).

- palinopsie** ◇ **palinopsia** ◇ **daradwelout, daradwel** g. Strafuilh ar merzhout gwelede naouus dre zrestpadout ha daremoueg ar skeudennoù (skeudennoù tasmant).
- palinphrasie, paliphrasie** ◇ **palinphrasia** ◇ **daradluz gerienne** Arreata dizehan an un bomm, an un klotenn, an un gwerzenn, an un frazenn.
- pallissyllabie** ◇ **daradluz leñvennel, daradleñv** g. Arreata a-strak andiarvenn ul leñvenn, peurliesañ leñvenn gentañ ar gerioù, azon pennañ ar gagerezh (sl. *bégaïement*).
- pallanesthésie** ◇ **pallanaesthesia** ◇ **froumaneraez** g. Steuz eraeziñ ar froumoù.
- pallesthésie** ◇ **pallaesthesia** ◇ **froumeraeziñ** Kizidigezh askornel ouzh ar froumoù, a erc'hwilier dre araez ur bondoner arloet ouzh ar c'hroc'hen.
- palliatif** ◇ **palliative** ◇ **goustegus** aa. En araez da zistanañ pe da lemel azonoù poanius ur c'hleñved hep gwerediñ war ar c'hleñved e unan; *arouelioù goustegus* (Gl. *soins p., Sz. p. care*), prederiadoù mezegel pe glañvdiourel amkanet da sioulaat pe da lemel poanioù ur c'hlañvour war-nes mervel.
- pallidal** ◇ **pallid** ◇ **pallidel** aa. A-zave d'ar voullenn c'hlas (TA *globus pallidus*), lodenn diabarzh ar gronn ferek (TA *nucleus lentiformis*); *azoniad pe reuter pallidel* (Gl. *rigidité pallidale*), teskad an azonoù a-geñver gant tizhad ar voullenn c'hlas, erzerc'h ent klinikel dre un azoniad parkinsonek (sl. *rigidité pallidale*).
- palpation, palper** ◇ **palpatio, touch** ◇ **teuta** Hentenn erc'hwiliañ korf ar gouziviad gant ar palv hag ar bizied e sell da imbourc'hiñ kantalc'h ar gwiadoù (tant ar c'higennoù), da spisaat bevennoù flugezioù 'zo, pe war glask da nevezfurmadoù, da dachadoù laurus pe danijennek, pe da dreuzkaserezh ezreol ar froumoù e par speur ar brusk, (sl. *auscultation, clinique : examen ~, inspection, percussion*).
- palpébral** ◇ **palpebral** ◇ **malvennel** aa. A-zave d'ar valvenn.
- palpitation** ◇ **palpitation** ◇ **rastrid** g. Merzhadur ezreol lammoù e galon gant ar gouziviad, hag int reol pe ezreol.
- NOTENN : Kevatal eo Br. *rastrid* d'an termen gallek arveret alies el liester.
- paludéen, paludique** ◇ **malarial, paludal** ◇ **1 paludek 2 paludeg** g. **-eion 3 paludel** aa. 1 Gant ar baludegezh. 2 Gouziviad ar baludegezh. 3 A-zave d'ar baludegezh.
- paludisme** ◇ **malária, paludism** ◇ **paludegezh b., malaria** g. Pore devoudet gant ur spesad hematozoed, ar *Plasmodium*, enkoret dre flemmañ gant perez wadezat ur moustik eus lies seurtad anofel (*Anopheles maculipennis* pergen); div furn a ziforc'her : 1) ar *baludegezh ennervezh* (Gl. *paludisme d'invasion*), oc'h erzerc'hañ etre 10 ha 15 devezh goude an erialadenn dre un derzhienn diastal pe spanaus, bestlus a-wechoù, heuliet gant gwaskadoù arreata ma c'hoarvez kridiennoù feuls, terzhienn da 41°C ha c'hwezennoù puilhek; 2) ar *baludegezh flugezel dedroat* (Gl. *paludisme viscéral évolutif*), oc'h anadiñ en ezvezañs prederiadur ha gant an dud aderialet, naouus dre un amwad grevus (betek 1 milion a hemati), ur felc'h ec'honek en ervez da fregañ, daralladur ar stad hollek, livegadur, terzhienn direoliek ha, d'ar par pellañ, ar fallezh paludel (Gl. *cachexie palustre*); gant ar *Plasmodium falciparum* pergen e stader rouestladoù : terzhienn vestlus troazhhemoglobinek (sl. *fièvre bilieuse hémogloburique*), terzhienn c'hanas (sl. *fièvre pernicieuse*); broreuziadek eo ar baludegezh er rannbarzhioù tomm, en he ardirzh emañ e-tro 40 % eus poblañs ar bed hag unan eus kentañ arbennoù marvelezh; ent klasel, e tiounezer ar c'hinin hag an enepaludieger kevanaoz evel liaoù ergurañ ha kurañ, nemet ez eo aet ar *Plasmodium* harzus outo, saviad war c'hrevusaat hemañ na vo elpennet nemet pa vo bet dizoloet liaoù nevez ha dreist holl dewerc'het ur vaksin.
- panangéite** ◇ **panangititis** ◇ **hollwazhiedfo** g. 1 Tanijenn holl wazhied (talmerennoù, gwazhiennnoù, limfforzhioù) un organ pe ur rannbarzh. 2 Tanijenn holl saeoù ur wazhiedenn.
- pananticorps** ◇ **panantibody** ◇ **panantikorf** g. Antikorf gwadveizel gwezhus ouzh ur seurtad antigen (evel an hemati, al leukokit, ar pladanoù), na pa zeufe an antigen-se eus ar gouziviad e unan pe eus un hinienn reol a un spesad pe a un rizh gwad pa vez kel a hemati; hervez o mod gwerediñ e tiforc'her ar panaglutininou hag ar panhemolizinoù (sl. *agglutinine, hémolysine*).
- panaortite** ◇ **panaortitis** ◇ **hollaortennfo** g. Tanijenn pe eus holl saeoù an aortenn pe eus an aortenn en he hed.
- panaris** ◇ **whitlow, felon** ◇ **beskoul** g. Anvad genadel tanijennoù lemm ar bizied, ne vern pe natur, pe astenned, pe zonder a ve dezho; *b. angostek* (sl. *Morvan : maladie pe panaris de ~*); *b. melanomel* (Gl. *p. mélanique*), lec'hiadur endan-pe tro-ivin ur melanom (yoc'henn yud) (sl. *mélanome*).
- pancardite** ◇ **pancarditis** ◇ **hollgalonfo** Tanijenn an enkalonenn, ar c'halongaher hag an amgalonenn, stadet dreist holl e-kerz dedro emdarzh remm lemm an arzoù; en ervez da zevoudañ ur reñver ec'honad ar galon (kalonusvoll remmel), dezhañ un dedro grevus.
- panchondrite** ◇ **panchondritis** ◇ **hollvigornfo** g. Tanijenn an holl vigern.
- Pancoast-Tobias : syndrome de ~** ◇ **Pancoast-Tobias syndrome** ◇ **azoniad Pancoast-Tobias** Azoniad a-geñver gant ur yoc'henn yud e kern ur skeventenn, naouus dre ur wriziennost C8-T1 (laur o saezhenniñ er skoaz, er vrec'h hag en dorn, a-wechoù gant gouzeiz an dorn), direizhoù simpatek (azoniad Claude Bernard-Horner, ustead kalon) hag, er skinouriezh, un demerenn a 'r gern, hogos bepred gant skeudennoù un distruj askorn er c'hostoù hag er melloù.
- pancréas, TA pancreas** ◇ **pancreas** ◇ **ilgreiz** g. Gwagrenn goazhadel loet a-dreñv ar stomok, ouzh he ober ur penn sterniet gant an daouzegenn, ur gouzoug, ur c'horf hag ul lost endalc'het er rouedenn felc'h-ilgreiz, *ezvorc'hat* (amilaz, lipaz,

tripsinogen, kimotripsinogen), gwehennet dre san hag adsan an ilgreiz davit lodenn a-ziskenn an daouzegenn, hag *enborc'hat* (insulin, glukagon, somatostatine) dre enezigoù Langerhans (sl. *amylase, chymotrypsinogène, duodénum, Langerhans : îlots de ~, lipase, rate, sécrétine, tripsinogène*).

pancréas en anneau ◇ **annular pancreas** ◇ **ilgreiz gwalennek** Kammeuziad an ilgreiz, hemañ o c'hronnañ lodenn a-ziskenn an daouzegenn.

pancréatectomie ◇ **pancreatectomy** ◇ **ilgreizezvenañ** Dilemel an ilgreiz a-zarn pe en holl.

pancréatico-lithotripsie ◇ **pancreatic lithotripsy** ◇ **grouanvreviñ er san ilgreiz** Disvoutañ ha breviñ grouan an ilgreiz.

pancréaticotomie ◇ **pancreaticotomy** ◇ **sanilgreizenbenañ** Flañchañ san an ilgreiz.

pancréatite ◇ **pancreatitis** ◇ **ilgreizfo g.** Tanijenn lemm pe henek an ilgreiz; an *i. lemm pe gourlemm*, e dianlen emgoazhañ ar wagrenn, anvet ivez *drama ilgreizel Delafoy* pa zedroe gwehall d'ar marv dindan un nebeut eurvezhioù pe un nebeut devezhioù, a bareer hiziv en un degouezhioù dibaot bennozh da galvezderioù an defraouiñ ha d'ar surjianerezh pa vez kiriek ar c'hrouanegezh vestlel; an *i. goulemm*, ken dramaek all en e zeroù, o trediñ gorrekoc'h dre zidorroù hag adfeilhoù etrezek an *i. henek*, naouus dre an treutadur herrek, an asikted, dardenn ar gellenn vestl ha strafuilhoù koazhadel diwar skorted an ilgreiz.

pancréatite chronique héréditaire ◇ **hereditary chronic relapsing pancreatitis** ◇ **ilgreizfo henek hêrezhel** Kleñved treuzkaset er mod aotozomek trec'hek oc'h erzerc'hañ adal ar vugeliezh dre gaouadoù kof laurus hag adfeilhus; en oadour e vez naouus dre arouezioù skorted ha razekadurioù en ilgreiz.

pancréatocholangiographie ◇ **pancreatocholangiography** ◇ **ilgreizbestlluniñ** Skinluniñ an ilgreiz dre ensinklañ un danvezenn Xdemer e-barzh san an ilgreiz hag er forzh vestl pennañ (san voutin an avu + san vestl), houmañ o vezañ demeraet ivez dre gateteriñ ar gloestr avu-ilgreiz dewerc'het e-kerz an daouzegennengweliñ (sl. *duodénoscopie*).

pancréatoentérostomie ◇ **pancreoenterostomy** ◇ **dasforzhañ ilgreizpervez** Kehentaat dre ur fic'h san an ilgreiz gant ar pervez.

pancréatogastrostomie ◇ **pancreatogastrostomy** ◇ **dasforzhañ ilgreizkreuz** Kehentaat dre ur fic'h san an ilgreiz gant ar c'hreuz.

pancréatogène ◇ **pancreatogenous** ◇ **ilgreizien aa.** A orin ilgreizel.

pancréatographie ◇ **pancreatography** ◇ **ilgreizluniñ** Skinluniñ an ilgreiz goude ensinklañ un danvezenn Xdemer e-barzh san an ilgreiz; dewerc'het e vez e-kerz ar gwezhioù surjaniel gant digoradur lodenn a-ziskenn an daouzegenn pe e-kerz un daouzegennengweliñ; an *i. war askenn* (Gl. *p. ascendante*) eo; an *i. war ziskenn* (Gl. *p. descendante*) a zewerc'her dre ezwanañ san an ilgreiz e par lost an ilgreiz.

pancréatoéjunostomie ◇ **pancreatojejunostomy** ◇ **dasforzhañ ilgreizyunegenn** Skarvañ surjaniel san an ilgreiz ouzh ar yunegenn.

pancréatolyse ◇ **pancreatolysis** ◇ **ilgreizezglenañ** Flañchañ pourc'had an ilgreiz en amkan dizalc'hediñ ar wagrenn, oberatadenn ergemennet en ilgreizfoioù henek nozelek hep grouanegezh vestlel nag iktet.

pancréatopathie ◇ **pancreatopathy** ◇ **ilgreizanaez g.** Anvad rumm klañvadurioù an ilgreiz.

pancréatoprive ◇ **pancreatoprivic** ◇ **olilgreizel aa.** A-zave da lamidigezh an ilgreiz.

pancréatostomie ◇ **pancreatostomy** ◇ **ilgreizezforzhañ** Dewerc'hañ ur fic'h etre san an ilgreiz hag an diavaez.

pancréatotomie ◇ **pancreatotomy** ◇ **ilgreizenbenañ** Flañchañ surjaniel an ilgreiz.

pancréatotrope ◇ **pancreatotropic** ◇ **ilgreizkerc'h aa., ilgreizkerc'hus aa.** O werediñ ent hanbarek war an ilgreiz.

pancréozyme ◇ **pancreozymine** ◇ **pankreozim g.** Hormon dedaolet gant glaourgenn an daouzegenn o fraouaat borc'herezh sug an ilgreiz.

pancytopénie ◇ **pancytopenia** ◇ **peuolkelligoù** Isniver holl elfennoù luniek ar gwad (hemati, leukokit, pladanou), kiriek dezhañ tizhad ar mel eskern pe distruj reñverek ar c'helligoù, e-barzh ar felc'h pergen.

pandémie ◇ **pandemia** ◇ **1 holleuziad g. 2 bedreuziad g.** 1 Treled ur pore d'an holl dud pe dost eus ur vroezen ledek pe ledekoc'h. 2 Treled ur pore astennet d'ar blanedenn a-bezh.

NOTENN* : Kent ar 4 mae 2009 e kaver an despizadur-mañ war load an ABY : “Ur bedreuziad grip a c'hoarvez pa anad un isrizh viruz nevez hep ma ve den ebet gwarezet dioutañ. Lies darreuziad a c'hell kregiñ en ur ser er bed, o tevoudañ un niver bras a zegouezhioù hag a varvoù.” Goude an deiziad-se, n'eus ket mui anv a gleñvel nag a vervel. Ne chom nemet an treled er bed a-bezh.

panencéphalite ◇ **panencephalitis** ◇ **hollempennfo g.** Tanijenn empenn o wazhañ war un dro ar steuñvenn louet (*louedempennfo*, sl. *polioencéphalite*) hag ar steuñvenn wenn (*gwenneppennfo*, sl. *leucoen-céphalite*).

panhypercorticisme ◇ **panhypocorticism** ◇ **peurgaenusvorc'h g., peurgaenusvorc'hegezh g.** Reñver borc'hañ an holl hormonou kaenuslounezhel (sl. *hypercorticisme*).

paniléite ◇ **total ileitis** ◇ **holलगlunegennfo g.** Tanijenn holl saeoù ar glunegenn (sl. *iléite régionale pe terminale*).

panique : **attaque** ou **crise de ~** ◇ **panic attack** ◇ **barr braouañ, braouad g.** Gwaskad spont gant holl erzerc'hadou un enkreiz garv o tarvezout war ur goueled govid ha kevret alies gant ar foranarur.

- panmastite, mastite totale** ◇ **diffuse acute infective mastitis** ◇ **hollvronnfo** g. Morfer strewek oc'h aloubiñ gwagrenn ar vronn en he fezh.
- panmyéloptisie** ◇ **panmyeloptosis** ◇ **hollveldizik** g. Aneaz naoues dre gevreted amwad, agranulokitoz ha gwadliñvoù e dianlen ur melangwe o c'horrekaat pe oc'h astaliñ furmidigezh an hemati, ar granulokit hag ar pladanou; naoued marvus pe a-gentizh, pe goude un dedro henek dre wadlestegezh pe gwadliñv flugezel.
- panmyélose** ◇ **panmyelosis** ◇ **holleskernvelad** g., **panmieloz** g. Aneaz o tizhout elfennoù ar mel eskern o parañ an hemati, ar granulokit, ar monokit hag ar pladanou, ken angweüs (hollveldizik), ken usweüs.
- panneux** ◇ **pertaining to pannus** ◇ **pannuzel** aa. A-zave d'ar pannuz.
- pannicule adipeux, TA panniculus adiposus** ◇ **panniculus adiposus** ◇ **golg'hedan** g. **behin** Gwiad kellaouek endan-groc'hen puilh ennañ ar flipigoù behin (sl. *hypo-derme*).
- panniculite** ◇ **panniculitis** ◇ **golg'hedanfo** g. Tanijenn ar gwiad behinel endan-groc'hen.
- pannus** ◇ **pannus** ◇ **pannuz** g. 1 Aneaz ar gornsaes, peurliesañ diwar un hegad hirbad, naoues dre evodadur ur rouedad wazhied war he gorre, kevret gant darwazh muiek ar gevresae; gwech e van treuzwelus ar gornsaes (*pannus tenuis*), gwech ez a damzemer (*pannus crassus* pe *sarcomatus*). 2 Gwiad foek greunek, a orin irgennek, o c'holeiñ migorn ar c'henvell, stadet en arzfoioù 'zo.
- panophtalmi(t)e, phlegmon de l'œil** ◇ **panophtalmia** ◇ **hollgadfo** g., **morfer g. al lagad** Tanijenn linus oc'h aloubiñ al lagad en e bezh, o trediñ peurliesañ d'an treloezad hag an isteñv anezhañ.
- panoptiques ou sténopéiques : lunettes** ~ ◇ **panoptic spectacles** ◇ **lunedoù l. panoptikel** pe **kraoanek** Lunedoù a zo erlec'hiet ouzh o gwerennoù daou skramm enno un igorad etre 0,6 ha 0,7 mm; azas emaint ouzh an holl weledoù ha kevaraezañ a reont merzhout ergorennoù nes tre.
- panostéite** ◇ **panosteitis** ◇ **hollaskornfo** g. Tanijenn an askorn en e bezh : amaskornenn, kaennenn ha mezonenn (gwiad spoueek pe mel askorn) (sl. *cortex 1, médullaire*).
- pansement** ◇ **dressing** ◇ **1 lienad** g., **anroad** g. **2 anroad** 1 Goloadur ur gouli gant teltoù dishadenn festet dre araez ur vandenn pe lurelloù peg. 2 Dre astenn ster, mezegadur gwareziñ, sk. : *a. ar ganol vezhur* (Gl. *p. du tube digestif*) (sl. *kaolin*, La-09 180-189).
- Pansini : syndrome de** ~ ◇ **Pansini syndrome** ◇ **azoniad Pansini** Teskad azonou oc'h erzerc'haat tizhad an ilpenn e-kerz paludegezh an hañv hag an dianeost, ouzh e ober an istantegezh, ar migevaot hag a-wechoù an arluz (sl. *cérébelleux : syndrome* ~, *confusion mentale, dysarthrie*).
- pansinusite** ◇ **pansinusitis** ◇ **lieskevfo** g. Tanijenn diaser lies kev lez-fri.
- panthérinien : syndrome** ~ ◇ **pantherinian syndrome** ◇ **azoniad panterinel** Teskad strafuilhoù leteñvel ouzh re ar pistradur dre an atropin, devoudet agentrat gant foueennoù 'zo evel an *Amanita pantherina* : gourboz, kefroù, ambren, mabusvoll, a-wechoù morgud ha glizi.
- pantophobie** ◇ **pantophobia** ◇ **spontalfo** g. Spourin rak kement a ambred ar gouziviad, gwerc'hel pe ambreel, aziadiad a stader er psikozioù lemm arluzerrizhel.
- pantothénique : acide** ~, **facteur FF, vitamineB₅** ◇ **pantothenic acid** ◇ **trenkenn bantotenek, parenn FF, vitamin B₅** Parenn greskiñ bezant e-barzh bouedoù diseurt (edeier, vioù, avu), diaraoger ar c'hoenzim A, an negezh anezhañ o tevoudañ kammeraez ar bleñchoù (sl. *acroparesthésie*).
- pan trope** ◇ **pan tropic** ◇ **hollgerc'h** aa. A-zave d'ur viruz en araez da wazhañ an holl wiadoù.
- papaïne** ◇ **papain** ◇ **papain** g. Enzim proteinloezus douchennet eus ar papaiez.
- papavérine** ◇ **papaverine** ◇ **papaverin** g. Alkaloid ar roz moc'h, gwazhiedfrankaer dre berzh e wered enebandag war ar c'higennoù levn.
- papillaires : tumeurs** ~ ◇ **papillary tumours** ◇ **yoc'hennou begennek** Anvad genadel ar yoc'hennou diseurt (sarkom, fibrom, karkinom, epiteliom) a zo ouzh o gorre tosennoù leteñvel ouzh begennoù usventek; kemm a lakaer etrezo hag ar papilhomou (sl. *papillome*).
- papilla, TA papilla** ◇ **papilla** ◇ **begenn** b. (Neuziadurezh) Balirenn vihan blot, sk. : *b. an nervenn weled* (Gl. *p. du nerf optique*), *b. al lounezh* (Gl. *p. du rein*), *begennoù an teod* (Gl. *p. linguale*).
- papillectomie** ◇ **papillectomy** ◇ **begennezvenañ** Dazbidañ aspleg (begenn) an daouzegenn, poent ma tifourk ar san vestl ha san an ilgreiz.
- papillite** ◇ **papillitis** ◇ **begennfo** g. 1 (Lagadouriezh) gouliñv begenn an nervenn weled, andesavelet e arbenn (tanijenn pe amwask). 2 Uswe ha tanijenn aspleg an daouzegenn e difourk ar san vestl, a-wechoù en orin ikterou 'zo (*b. ikterieat kentael Caroli*) ha direzhoù ilgreizel.
- papillite linguale** ◇ **lingual or tongue papillitis** ◇ **begennfo an teod** Gouliezoù bihan laurus kenan, hewel dre ar werenn greskiñ hepken, kuzh etre plegoù glaourgenn an teod en dro d'ar begennoù penndogek.
- papillomatose** ◇ **papillomatosis** ◇ **papilhomatoz** g. Aneaz tredizhus hag enkoradus, naoues dre vezañs lies *gvenaenn* pe *papilhom* kroc'henek pe glaourgennel, stadet alies war ar chas, ar c'hezeg hag an oc'hen, treuzkasadus d'an dud.

papillome ◇ **papilloma** ◇ **papilhom** g. Anaf ar c'hroc'hen hag ar glaourgennoù, naous dre usvent ar begennoù bonan, a arbennoù liesseurt : gwenaennoù, gwenaennoù soavredel, struzhennoù gwenerel, h.a.

papillotomie ◇ **papillotomy** ◇ **begennenbenañ** Flañchadenn ar gloestr avu-ilgreiz (Gl. *ampoule de Vater*; TA *ampulla hepatopancreatica*) evit eztennañ ur c'hrouanenn kouboulet.

Papovaviridæ, Papovaviridés ◇ **Papovaviridae** ◇ **Papovaviridae, Papovavirideged** l. (g.) Kerentiad viruzoù gant DNA daouarrevell etre 45 ha 55 nm hed, en o zouez viruzoù ar gwenaennoù, ar papilhomou (genad *Papillomavirus*) ar poliom (genad *Polyomavirus*) hag ar viruzoù SV 40 ha SV 5 a 'r simianed.

papule ◇ **papule** ◇ **krugenn** b. Anaf elfennel a 'r c'hroc'hen, ouzh e ober un dosenn sonnel, dezhi stummoù daskenek (kernennek, kouc'hellek, talbennigaouek), ur vent etre re ur c'hreunenn vell hag ur ferenn, ul livrezh roz, ruz pe gell, o steuziañ a-benn un nebeut devezhioù hep lezel kleizenn ebet war e lerc'h; hervez gwikefre amparidigezh ar grugenn e tiforc'her : 1) *k. gelligel* (Gl. *p. cellulaire*), sec'h, kalet, hevonn, diwar ensiladur doues gwelead gorre an derm, 2) *k. vigennevidel* (Gl. *p. dysmétabolique*), elfenn ec'honek a-walc'h, eilvedel da goc'hionadoù danvezenn anlun, 3) *k. epidermel*, (Gl. *p. épidermique*), amvalirek, plaen, diwar usvent lec'hiek gweleadoù an ezkroc'hen, 4) *k. volc'hennel* (Gl. *p. folliculaire*), balirenn vihan kalet ha sec'h, kreizet war ur volc'henn vlevel, 5) *k. vilier* (Gl. *p. miliaire*), tosenn vihan treuzluc'hus evodet eus ar gwagrennoù c'hwezpar, 6) *k. c'houliviek* (Gl. *p. œdémateuse*), anaf al linadell, elfenn roz-arwenn, dastennek, direadus dre ar pouezañ.

papulose ◇ **papulosis** ◇ **papuloz** g. Dispuilhad krugennou.

papulose atrophante maligne, syndrome de Degos ◇ **papulosis atrophicans maligna** ◇ **papuloz isteñvus yud, azoniad Degos** Kleñved dibaot tre, dianav e arbenn, naous da gentañ dre an dispuilhad war ar c'hef hag an izili krec'h eus krugennou bihan kouc'hellek rozenn o vont war bukañ ha dislivañ en o c'hreiz, o tedeñ dre resmiadoù hep terzhien edoug sizhunvezhioù pe mizvezhioù, betek ma tarvez trumm ul laur kof lemm diwar un ampeleñfo lemm dre dreloead, marvus dindan un nebeut devezhioù; strewet ez eus tiennou azvelen war ar vouzellenn voan, enno daralladoù a 'r gwazhied, reoù 'zo trombozek.

papulose bowenoïde ◇ **bowenoid papulosis** ◇ **papuloz bowenoidel** Papuloz eritematus pe livegennek sezet war groc'hen ha glaourgennoù an organoù ganadel; dispis eo ar bevennoù nozologek etre ar *p. b.* ha *kleñved Bowen*, furm epiteliom ebarzh-ezkroc'hen.

papulose lymphomatoïde ◇ **lymphomatoïd papulosis** ◇ **papuloz limfomatoïdel** Dispuilhad krugennou ha nozelennou darvennenn ha trouskennus alies, sezet a-gemparzh war an izili hag ar c'hef, o tedeñ dre resmiadoù e-doug mizvezhioù ha bloavezhioù, anaez kuñv daoust da neuz yud anafoù leteñvel ouzh re al limfon.

paquet-année ◇ **package-year** ◇ **pakad-bloaz** Elfenn vuzul bevezadur ar butun; ur *p.* a verk 20 g butun bevezet bemdez edoug ur bloavezh, unanenn o talvout da andalañ riskl ar c'hank hag an anaizioù gwazhiedel.

para-amino-salicylique : acide ~, **PAS** ◇ **para-aminosalicylic acid** ◇ **trenkenn** b. **baraaminosalikilek** Deverad aminek an drenkenn salikilek, gentañ *in vitro* hag *in vivo* perzhioù bakteriharz ouzh bazhell Koch.

para-Cushing : syndrome ~ ◇ **azoniad kuchingvanek** Azoniad kaenusvorc'hegezh arc'hwelel o tennañ da azoniad Cushing hep ma vez muiaet feur an hormonou kaenuslouezhel ezvevennet dre an troazh; ned eo ket dibaot gant ar vugale da vare ar gaezoureezh; dedreñ a ra bepred etrezek ar pare.

parabasedowien : syndrome ~ ◇ **pseudohyperthyroidism** ◇ **azoniad bazdovvanek, gauskoedusvorc'h** g. Taolenn glinikel a stader gant ar merc'hed yaouank, leteñvel ouzh teskad arouezioù kleñved Basedow : nervenreezh, ustead kalon, rastrid, kren fromel, strafuilhoù gwazhiedloc'hadel ha bredel, hogen hep pennisac'h, na treutadur, na darallad feur an hormonou skoedel; displeget e ve dre un direizh arc'hwelel eus ar reizhiad nervstruzhel.

parabiose ◇ **parabiosis** ◇ **lezveved** g., **lezvevadezh** b. Kevredadur etre daou pe lies bevedeg o tiorren diaser, ma vez unan o ren ur beved piaouel hag ar re all o vevañ diwar e goust (sl. La-09 168).

paracentèse ◇ **paracentesis** ◇ **trevidañ, trevid** g. Flañchañ ur spur, peurliesañ evit karzhañ un hogennad liñvel diouzh ur gavenn naturel (krezoù, amgalonenn, ampeleñ, skouarn, h.a.) (sl. *myringo-tomie*).

paracervix ◇ **paracervix** ◇ **lezgouzoug** g. Parzh izelañ al lezkroz (sl. *Manchester : opération de* ~).

parachute : valve mitrale en ~ ◇ **parachute mitral valve** ◇ **trapig** g. **mintrek e stumm harz-lamm** Kammneuziad an trapig mintrek, a gengerc'h o c'herdad etrezek ur gignenn vegennek (TA *musculus papillaris*) unel, raklen d'un isvoll mintrek, kevredet gant kammneuziadoù kalon all.

paraclinique ◇ **para-clinic** ◇ **lezklinikel** aa. O klokaat ar c'hlinik; *imbourc'h lezklinikel*, kalvezder kevaraez d'an deznauñ : elfennerezh bevoniell, engweliñ, skeudennerezh mezegel, barrwezañ (sl. La-17 331-337).

paracolite ◇ **paracolitis** ◇ **lezkolorno** g. Tanienn ar gwiad kellaouek drek-kolon ha rouedenn ar c'holon, o tedeñ a-wechoù d'al linadur, peurliesañ e dianlen ur c'holonfo askennus.

paracousie ◇ **paracousis** ◇ **kammglev** g. Andiktet merzhout read pe uc'her ar sonioù (sl. *diplacousie*, La-18 132).

paracousie de Willis ◇ **paracousis of Willis** ◇ **kammglev Willis** Lemmaat ar c'hleved aere e-barzh meteier trouzus (bouzared o klevout gwell eget an dud reol e-barzh ur c'harr o ruilhal), arouez un anaf grevus ar skouarn greñn.

paracrine ◇ **paracrine** ◇ **kefinenborc'hat** aa. A-zivout ur gellig he devez he enborc'hadoù delanvad war ar gwiadoù kefin (sl. *autocrine, endocrine, pléihormone*).

- paradentaire** ◇ **paradental** ◇ **lezdantel** aa. Loet e-kichen an dant; *yoc'henn l.*, *yoc'henn* evodet diwar dilerc'hiou à gwiadou dantparer (sl. *adamantinome*).
- paradiabétique** : **état** ~ ◇ **paradiabetes** ◇ **lezdiabet** g. Erzerc'had kleñvedel nes d'an diabet, hep arouez klinikel, naouus hepken dre ur muiadur argrenn eus ar glukozwadvec'hiañ, ar proud-mañ diwezhañ o vezañ heuliet gant un droazhc'hlukezezh leiek; e stadañ a reer e familhoù an diabeiteion, gant ar vorreion, an dud dreistmaget, e-kerz poreoù pe anaezioù avuel, lounezhel, enborc'hadel (sl. *hyperglycémie provoquée : épreuve de l'~, intolérance au glucose*).
- paradoxe français** ◇ **French paradox** ◇ **diac'hinad** g. gall Gwered gwellaat an azoniad kurunerel gant ar gwin bevezet kerreizh, jedet ent stadegel dre geñveriañ ar feurioù mervel e lies bro.
- parafango** ◇ **parafango** ◇ **parafango** g. Meskad tommet parafin ha fank havel diounezet evel dic'hoster dre arloadurioù lec'hiek (sl. *boue thermale, fango, fungothérapie*).
- paraffine, alcane** ◇ **paraffin** ◇ **parafin** g., **alkan** g. Anvad genadel an hidrokarbidennoù peurvec'h a zelun hollek C_nH_{2n+2} , aozadoù bevel, ankediedik pe dost, dourlez ha lenkraus; oberiet e vez meskadoù a zo o c'hantalc'h diouzh hed ha kenfuihadur ar molekul; er vezekniezh e reer gant daou veskad : an eil, sonnenn wenn o teuziñ e tro 50°C, a zanvezer er wiadoniezh evit entoueziañ tammoù gwiad a-raok o zellennañ, egile, an eoul parafin (Gl. *huile de paraffine, Sz. mineral oil, liquid parafin*), ansugadus gant glaourgenn ar pervez, a vez arveret evel laoskuzenn flour (sl. *inclusion, laxatif*).
- paraffinome** ◇ **paraffinoma** ◇ **parafinom** g. Seurtad oleom, neradur stirek evodet diwar sankadennoù osodel parafin (sl. *oléome*).
- parage** ◇ **dressing** ◇ **kempenn** Ober war dro ur gouli evit e brientiñ da gleizennañ, dre e naetaat (*diziblañ*) ha troc hañ kuit ar gwiadou ezvevaet (*amnaziñ*) (sl. *cicatrization, détersion, dévitalisation, excision, La-08 231-234*).
- paragenèse** ◇ **paragenesis** ◇ **ec'houleviañ** Diorreadur ur bevedeg pe ur rann vevedeg o forc'hiñ diouzh an arouleviañ, eleze diouzh goulev bonan ar spesad (kammneuziad, euzhegezh) (sl. *régula-tion, La09 322-323*).
- paragnosie** ◇ **paragnosia** ◇ **kammzaznaoud** g. Kammanglevad e taznavezer un den, un dra, ur blegenn (sl. *agnosie, déjà vu : phénomène du ~, paramnésie 2*).
- paragonimiase, paragonimiasis** ◇ **paragonimiasis** ◇ **paragonimiaz** g. Gwadskopad broreuziat er Reter-Pellañ, kleñved diwar *Paragonimus wester-manni* pe *ringeri* pe *Distoma pulmonale* pe *ringeri* pe *westermanni*, anezhañ an distomatoz skevent.
- paragrammatisme** ◇ **paragrammatism** ◇ **paragrammategezh** b., **kammezluz** g. **kevreadurel** Arver darallet ar furmoù gramadegel, unan eus azonoù ankomez Wernicke, stadet en e furn vuiek gant ar jagouilherezh (sl. *aphasie de Wernicke, caco-lalie, jargonaphasie, La-14 378-384, La-17 232-235*).
- paragranulome** ◇ **paragranuloma** ◇ **paragranulom** g. 1 *P. Hodgkin* (Gl. *p. de Hodgkin, Sz. Hodgkin's p.*) furn a 'r c'hleñved naouus dre vuiegezh al limfokit ha dibaoted kelligoù Sternberg er gwerblennoù. 2 *P. Poppema ha Lennert* (Gl. *p. de Poppema et Lennert, Sz. Poppema's p.*), furn ozvennel limfokitel eus ar c'hleñved, a denner hiziv d'ober anezhi ul limfom B anhodgkinek (sl. *Hodgkin : maladie de ~*).
- paragraphie** ◇ **paragraphia** ◇ **kammskriv** g. **geriadel** Darallad al lavar skrivet, naouus dre veskadur ar gerioù (sl. *agraphie*).
- paragueusie** ◇ **parageusia** ◇ **kammdañva** g. Darallad an tañva (sl. *cacogueusie*).
- parahémophilie** ◇ **parahaemophilia A** ◇ **parahemofiliezh** b. Anaez hêrezhel erzerc'hat adal ar vugeliezh, naouus dre wad-liñvoù arreat, heñvel ouzh re an hemofiliezh; muiat eo an amzer goulediñ ha dreist holl amzer Quick; kiriek eo ezvezañs ar proakelerin er plasma (sl. *hémophilie*).
- parahormone** ◇ **parahormone** ◇ **parahormon** g. Danvezenn dehetet gant ar gwad, ganti ur gwered fraouaat hep bezañ paret gant ar reizhiad enborc'hañ, sk. : ar CO₂.
- parakératose** ◇ **parakeratosis** ◇ **parakeratoz** g. Kroc'henad naouus dre ur strafuilh eus furmidigezh ar gornhaen; 1) *p. pitiriazizvanek* (Gl. *p. pityriasiforme, Sz. pityriasiform seborrhic dermati-tis*), seurtad ekzematid o sezañ war an divesker, dreist holl teuc'hellek, anezhañ plakennoù roz pe arvelen, warno gourc'hennoù bihan, unhaenek; 2) *p. psoriazizvanek* (Gl. *p. psoriasiforme, Sz. psoriasiform seborrhic dermatitis*), seurtad ekzematid o sezañ war ar c'hef ha gwrizienn an izili, nes d'ar *p. pitiriazizvanek*, gant plakennoù rusoc'h, direolekoc'h, goloet gant gourc'hennoù paotoc'h, gwenn, lavnennek, lieshaenek (sl. *eczématide, pityriasis, psoriasis*).
- parakinésie** ◇ **parakinesis** ◇ **kammfiñv** g. Diouer kedren ar fiñvoù diarvenn.
- paralexie** ◇ **paralexia** ◇ **kammlenn** g. Strafuilh al lenn, anezhañ erlec'hiañ gerioù anster ouzh gerioù an destenn.
- paralyse** ◇ **paralysis, palsy** ◇ **1 seizi** g. **2 peluz** g. 1 Leiäd pe steuz al loc'hañ; hervez lec'hiad ha derez ar seizi e komzer eus *ledseizi* (Gl. *hémiplegie*), *treuzseizi* (Gl. *paraplegie*), *unseizi* (Gl. *monoplegie*), *gouseizi* (Gl. *parésie*). 2 Steuz al loc'hañ forzh pe arbenn a ve dezhañ.
- NOTENN : Ent resis, ez arverer Br. seizi da verkañ strafuilh al loc'hañ diwar un tizhad a 'n nervreizhiad, Br. *peluz* pa vez un arbenn all da strafuilh al loc'hañ, da skouer e tro steuz al loc'hañ a orin bredele, evel ar *peluz darfell* (Gl. *paralyse hystérique*).
- paralyse à tiques** ◇ **tick paralysis** ◇ **seizi diwar darlask** Seizi gwak askennus e dianlen brazhad tarlaskenned eus ar genadoù *Ixodes, Dermacentor, Haemophysalis*, o tizhout ar vugale dreist holl, peurgetket en Oregon hag e Kolombia Vreizhveuriat; dianva e chom ardarzh ar c'hleñved.

paralysie des amoureux ◇ **saturday night palsy** ◇ **seizi ar serc'heion** Seizi a-werzhid diwar ar pouezañ war an arvec'h gant penn ur c'housker e-pad an noz.

paralysie anapeiratique ◇ **anapeiratic palsy** ◇ **seizi arrefiñvadel** Seizi devoudet gant arreata an hevelep fiñvou; a-wechoù e tarvez evel rouestlad d'ar glazoù micherel (sl. *crampe des écrivains*).

paralysie auriculaire ou **atriale** ◇ **auricular** or **atrial standstill** ◇ **astal g. kentez** Paouez ar gwerederezh tredanel ha treloc'hel er c'hentezoù; emañ blivaerezh ar galon dindan ur gorvez ec'hamzalc'h kevreele gorrek; *dibad* e vez a-wechoù an astal, eilvedel neuze d'ur pistriadur (brulu, kinidin), d'ar gwadusvec'h kaliom, da angwazhiad ar c'haheer kalon pe d'un tredansak; *padek* e vez peurliesañ, a orin dic'henezhadel gant an oadourion yaouank, e-kerz an diabet hag ar mifeñvou kaherel, o rekizañ en dro-se ensteadadur un tredanfraouaer; e-kichen ar *furmoù hollel* e stader *furmoù darnel*, o tizhout ent hanbarek ar c'hentez dehou, o tarvezout da heul ur prantad hir a gantezkrehad gant gouziviaded un trapignaoed mintrek-tribroudek pe ur c'hahernaoued kalon (sl. *activation, bloc sino-atrial, échappement, jonction atrioventriculaire*).

paralysie bulbaire aiguë de Leyden ◇ **acute bulbar palsy** ◇ **seizi hirvele lemm Leyden** Tanijenn lemm gronnoù louet an hirvel (*louedempemfo izelañ lemm*, Gl. *polioencéphalite inférieure aiguë*) o teraouiñ trumm dre ur c'hloppennad, trolernioù, laurioù er c'hilpenn ha diouzhtu goude seizi a 'r c'houel-stavn, a-wechoù seizi a 'n dremm, migevaot ha strafuilhoù a 'l lonkañ; a-benn un nebeut devezhioù e tarvez direizhoù kalongwazhiedel, morvor hag ar marv; anaez o tizhout an alkooleion pe o tedreiñ e-kerz ar poreoù yud, azoniad Landry pe kleñved Heine-Medin (sl. *polioencéphalite*).

paralysie bulbospinale ◇ **bulbosspinal paralysis** ◇ **seizi hirvel-livennvel** Furm eus ar *seizi hirvel-teod-garloc'henn*, a stader pa vez tizhet ivez gronnoù loc'hañ ar mel, anezhi seizi gant isteñv kaherel e tiriad nervennoù al livenn koulz hag e tiriad nervennoù an hirvel.

paralysie centrale ◇ **central paralysis** ◇ **seizi a-greiz** Seizi diwar dizhad an neuron nezek loet e-barzh an nerveg kreiz (sl. *para-lysie périphérique*).

paralysie du matin ◇ **morning palsy** ◇ **seizi ar beure** Furm vlin eus kleñved Heine-Medin : ar prantad terzhienn deroù o tioueriñ, e tarvez ar seizi e-kerz an noz ha dizoloet e vez d'an dihun (sl. *Heine-Medin : maladie de ~*).

paralysie du sommeil ◇ **sleep paralysis** ◇ **hunbeluz g.** Peluz bloc'hel berrbad a erdeb kuñv o tarvezout da goulz an enhuniñ pe an ec'huniñ; a-geñver emañ gant dislank an defroù, ha kevret e vez alies gant an darsouz hag an hunfell (sl. *cataplexie, éveil : réaction d'~, hypna-gogique, hypnopompique, narcolepsie*).

paralysie flascospasmodique ◇ ◇ **seizi gwak-dasstrizhek** Seizi gant istant ha reñveregezh an damougoù a-stirenn (sl. *para-lysie spasmodique*).

paralysie flasque ◇ **flaccid palsy** ◇ **seizi gwak** Seizi gant istant hag ezvezañs an damougoù a-stirenn hag a-groc'hen (sl. *para-lysie spasmodique*).

paralysie générale progressive, périencéphalite chronique diffuse ◇ **general paralysis on the insane** ◇ **seizi g. hollek argreskus, envedi b. beluzel** Rouestlad goulerc'hat a 'r sifiliz, naouus, *ent neuziadurel* dre un danijenn strewek ar c'hreizennoù nerval hag ar goloioù anezho gant bezañs *Treponema pallidum* er gwiadoù, *ent klinikel* dre zisleberadur argammedek ar meizerezh, un ambren (meurvreadezh) ha strafuilhoù nerval; luziadur ar gomz, maboù lagad distummet, kren an teod; dedreiñ a ra d'an envedi ha d'an andalc'hiaezh; darvezout a ra ar marv dindan 3 pe 4 bloaz.

NOTENN : Da envel ar c'hleñved-mañ eo boaziek ar gerioù Gl. *paralysie*, Sz. *paralysis*, Al. *Lähmung*, evit da steuz al loc'hañ bezañ un azon a eil renk. Kinnig a ran ivez ober gant Br. *seizi* ha *peluz*. Ne 'm eus ket kredet terriñ an henvoaz, seul gent ma 'z eo dibaot kaer hiziv ar sifiliz "pervedel" (sl. *sypilis*).

paralysie intermittente ◇ **intermittent paralysis** ◇ **peluz spanaennek** Resmiad peluz diwar ur gwaskad paludegezh, o padout un nebeut eurvezhioù hag oc'h echuiñ dre ur c'hwezenn; diazezet emañ an deznaou war vareadegezh ar resmiadoù hag ar gwered warno eus ar c'hinin.

paralysie labio-glosso-laryngée ◇ **progressive bulbar paralysis** ◇ **seizi gweuz-teod-garloc'henn, seizi hirvele argammedek** Azoniad a stader e-kerz ar skleroz kostezel kaheristeñvus, al louetvelfo araok henek, ar poreadoù diwar viruz nervgerc'h, ouzh e ober ur seizi liesel gant isteñv kigennoù an divweuz, an teod, ar ouel-stavn, ar c'harloc'henn, ar c'hargadenn, o tedreiñ d'ar marv dindan 2 pe 3 bloaz dre astenn an tizhadoù da nervgreizennoù an anañ hag ar galon, oc'h erzerc'haat anafoù gronnoù loc'hañ lodenn izelañ an hirvel.

paralysie périodique familiale ou **simple intermittente** ◇ **familial periodic paralysis** ◇ **seizi hêrezhel mareadek pe eeun spanaennek** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, o c'hoarvezout a resmiadoù seizi naouus dre dri azon : 1) treuz- pe pevarseizi gwak hebiat d'ar c'higennoù e diazalc'h an nervennoù a-glopenn, 2) steuz klok an damougoù a-stirenn en izili, 3) anvrouadusted faradek ha galvaniek ar c'higennoù seizet, hep strafuilh keffedel, santadel pe kelc'hstrishaerel; deraouiñ a ra ar resmiadoù d'ar gaezouregezh hag anadiñ e dibenn an noz pe goude ur pred paot ennañ ar glukid, o padout un nebeut eurvezhioù pe devezhioù hag o tistreñ goude entremeziou kemmus kenan ma ne stader azon nerval ebet; e-doug ar resmiadoù, e vez kaliomisvec'h er gwad hag en troazh hag -usvec'h er c'helligoù (sl. *adynamie épisodique héréditaire*); deskrivet ez eus bet *seizioù mareadek anhêrezhel eilvedel* da anaezioù o tevodañ gwadus- pe gwadisvec'h kaliom : skoedusvorc'hegezh, uc'haldosteronegezh, skorted lounezh hag uslounezhenn, koma akidozel, h.a.

paralysie périphérique ◇ **peripheral paralysis** ◇ **seizi trobarzhel** Seizi a-geñver gant gwazhad an neuron pellek loet etre an neuron nezek hag ar c'higennoù (sl. *paralysie centrale*).

paralysie pseudobulbaire ◇ **pseudobulbar paralysis** ◇ **seizi gaouhirvelel** Azoniad o tarvezout gant ar gozhiaded arterioskleroze, e dianlen ur steudad annonoù boukadur empenn pe *loezennoù* (sl. *lacunes*) gant istevñ strewek an danvezenn nerval; stadañ a reer un teskad direizhoù loc'hadel daoudu ha strafuilhoù bred (*loezennegezh*, Gl. *état lacunaire*) : gouseizioù o tevoudañ an *argenk a-bilpaz* (sl. *démarche*), barroù c'hoarzhin ha gouelañ dasstrizhek, gwanidigezh kefredel, strafuilhoù ar gomz hag al lonkañ a-geñver gant tizhadoù an hirvel; dedreiñ a ra, a-dreuz orc'hadoù bihan, etrezek an envedi hag an andalc'hiadezh (sl. *cérébroscélrose*).

paralysie ou myopathie pseudohypertrophique type Duchenne, maladie de Duchenne ◇ **pseudohypertrophic muscular paralysis** ◇ **seizi pe miopatiezh gaouustevñel rizh Duchenne, kleñved Duchenne** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod enkilek reveret, furm gahernaoued kentael argammedek (sl. *myopathie primitive progressive*) o teraouiñ er vugeliezh a-raok ar 5t bloaz, gant ar baotred peurliesañ, dre an izili traoñ ma vez masklet istevñ ar c'higennoù hag angrizad ar stirenoù gant un dispakadur behinstirek (gaouustevñ kigennoù ar c'hof gar, ar c'higennoù gevell ha kigennoù gouriz an ezel traoñ), oc'h aloubiñ da c'houde kigennoù an izili krec'h; alies e stader war un dro tizhadur ar c'haker kalon, direizhoù gwazhiedloc'hadel hag osteoporoz; ent argammedek e tedro ar c'hleñved etrezek an nammed klok ha darvezout a ra ar marv dindan 5 da 15 vloaz dre ur poreadur daskerzhat pe ar skorted kalon.

paralysie psychique ◇ **psychic paralysis** ◇ **peluz eraezien** Anniñv, hep seizi gwirion, en un ezel tizhet gant strafuilhoù bras an eraeziñ (anaf an dolbezenn gitem); ar gouziviad ne fiñv e ezel nemet pa vez rediet d'ober.

paralysie radicaire ◇ **radicular paralysis** ◇ **seizi gwriziennel** Seizi e dianlen daralladur ar gwriziennnoù nerval, termen arveret ivez evit ar seizioù o wazhañ an daoudañvoù (kefioù ha gwriziennnoù) a ya d'ober ur blezhad, sk. : *seizi gwriziennel izelañ plezhad ar vrec'h* (Gl. *paralysie radicaire inférieure du plexus brachial*).

paralysie du sommeil ◇ **sleep paralysis** ◇ **hunbeluz g.** Peluz bloc'hel berrbad a erdeb kuñv o tarvezout da goulz an enhuniñ pe an ec'huniñ; a-geñver emañ gant un defroù war zislank, ha kevret e vez alies gant an darsouz hag an hunfell (sl. *cataplexie, éveil : réaction d'~, hypna-gogique, hypnopompique, narcolepsie*).

paralysie spasmodique ou spastique ◇ **spastic paralysis** ◇ **seizi dasstrizhek** Seizi gant dargrezañ pikernennek (sl. *pyramidale : contracture ~*).

paramastite, phlegmon perimammaire ◇ **paramastitis** ◇ **lezvronno g., morfer tro-vronn** Nep tanienn dinodet en dro d'ar vronn, ken er c'hroc'hen pe er gwiad endan-groc'hen, ken er gwiad kellaouek drek-gwagrenn.

paramédical ◇ **paramedical** ◇ **lezvezegel aa.** Kevredet gant, klokaus da embreg ar vezekniezh (sl. *santé : professions de ~*).

paramétabolite ◇ **antimetabolite** ◇ **gourzhkennevidad g.** Danvezenn o taskemmañ, er bevedeg, kennevid korfoù 'zo dre zegerc'hañ aozadoù treugel pe o skoilhañ ouzh gwered enzimoù ret da endodiñ ar c'horfoù-se (sl. *antimétabolite, uricofréateur*).

paramètre¹, TA **parametrium** ◇ **parametrium** ◇ **lezkrozh b.** (Korfadurezh) Parzh uhelañ ar stagell ledan, gwiad kenglenel ouzh e ober, treuzet gant ar san droazh ha gwazhied ar grozh hag ar gouin (sl. *ligament large, paracervix*).

paramètre² ◇ **parameter** ◇ **arventenn b.** (Jedoniezh) termen arveret evit deanyiñ gwezhiadurioù 'zo, pe kementadoù 'zo, a fester da gentañ diouzh a venner hag a zalc'her arstalek da heul, en ur gevreizhenn, un atalad, ur riñvenn, diskoulmoù ur reizhiad ataladoù.

paramétrite ◇ **parametritis** ◇ **lezkrozhfo g.** Tanienn lemm (*morfer nes-krozh*, Gl. *phlegmon juxta-utérin*) pe henek gwiad kellaouek ar stagell ledan, dinodet er poull koazez-youlc'h uhelañ.

paramimie ◇ **paramimia** ◇ **kammevid g., kammezluz g. meidel** Disklot ar meidiñ (dremmveziou ha jestroù) diouzh ar blegenn, erzerc'had eus disfaout ar me, azon a 'r skizofreniezh (sl. *amimie, discordance, mimique, parasémie, schizophrénie*).

paramnésie 2 paramnésie de certitude, fausse reconnaissance, impression du déjà vu 3 paramnésie de localisation ◇ **1 paramnesia, mismeant 2 pseudomesia, "déjà vu" phenomenon** ◇ **1 kammereulañ 2 kammaznaout, anadenn b. ar buhezec'hoazh 3 kammgoun loañ** 1 (Lordat, 1843) strafuilh an ezluzañ, ar gouziviad o vezañ ankouaet ster ar gerioù a ra ganto en e brezeg (sl. *jargonaphasie, paragrammatisme, para-phasie, paraphémie*). 2 Strafuilh ar c'hounerezh, kammanglevout buhezañ ur blegenn bet buhezec'hoazh (sl. *déjà vu : phénomène du ~*) 3 kounaat ur blegenn werc'hek en ur he c'hammloañ en amzer pe en egor.

NOTENN : Lod eus ar geriadurioù allyezh a dremen hebioù d'an termen-mañ en abeg da liested savboentoù an aozerion hervez ma teskrivont strafuilhoù nerval, bredel pe lavarel.

paramorphisme ◇ **paramorphia** ◇ **lezneuziad b.** Anvad genadel kinniget gant Pende evit strolañ daralladoù an neuziadur genezhel, enganet pe arzeuat.

paramusie ◇ **paramusia** ◇ **songammluz g.** Strafuilh skiant ar sonerezh, ar gouziviad o vezañ gouest da ganañ en ur faziñ avat war an tonioù hag an esaouennoù (*songammezluz*) pe da verzhout perzhioù sonel ur gemalenn klevet hep bezañ gouest d'he daznaout (*songammenluz*).

paramycétome ◇ **paramycetoma** ◇ **paramiketom g.** Koeñvenn foel diwar dinodadur ur foue o tevoudañ usvent, distummadur ha distruj ar gwiadoù, disheñvel diouzh ar miketom dre ezvezañs ar greun (sl. *mycétome*).

paramyélocytes ◇ **myelocytes-like** ◇ **paramielokit s.** Kelligoù gwad ezreol, nes d'ar monokit ha d'ar mielokit; kevarall int d'ar remañ dre o c'hraoñell flipezennek ha finded greunennadoù o frotoplasm (sl. *métamyélocytes*).

paramyélocyrose ◇ ◇ **paramielokitoz g.** Bezañs paramielokit er gwad, naouus da wadnaouedoù a seurt gant ar mielosarkomatozioù hag al leukemiezhoù mieloidel (sl. *myélocyrose*).

paramyoclonie ◇ **paramyoclonus** ◇ **treuzkahergrid g., treuzkrid g.** Kahergrid o tarvezout en daou ezel traoñ, en daou ezel krec'h, er c'hef pe en dremm (sl. *clonie, myoclonie, myoclonie épileptique*).

paramyotonie, myotonie paradoxale ◇ **paramyotonia** ◇ **paramiotoniezh b., miotoniezh diac'hinek** Seurtad miotoniezh muiaet gant ar strivañ endra vez skañvaet peurliesañ ar viotoniezh gant an embreg korfel (sl. *myotonie*).

paramyotonie congenitale, maladie d'Eulenburg ◇ **paramyotonia congenita** ◇ **paramiotoniezh c'hanedigel, kleñved Eulenburg** Anezet hêrezhel dibaot kenan, treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, o teraouiñ nebeut goude ar c'hanedigezh, naouus dre gaouadoù argizus reuted dasstrizhek ha laurus ar penn, ar gouzoug hag an izili krec'h, heuliet gant seizi kemparzhek strollou kigennoù en izili, delanket peurliesañ gant an argrezadoù arreat hag ardirz ar yenion; kiriek dezhañ e ve darallad iongan natriom koc'henn ar c'hahegelligoù (sl. *adynamie épisodique héréditaire, canal sodique, Thomsen : maladie de ~*).

paranéoplasiques : manifestations ou syndromes ~ ◇ **paraneoplastic syndrome** ◇ **azoniad lezhanweel** Lezanaezadoù o tarvezout e-kerz dedro ur c'hankr, kankr bihangelligoù ar bronkez dreist holl, dianav o ardarzh : ne vez kiriek dezho nag un dassez, nag un amwask; anezho strafuilhoù nerval (sl. *neuropathie paranéo-plasique*), kaherel (sl. *dermatomyosite*), askornarzel (sl. *ostéoarthropathie hypertrophiante pneumique, hippocratisme digital*), kroc'henek (akantoziz nigrikans), enborc'hadel (sl. *Schwartz-Barter : syndrome de ~, Cushing : maladie de ~*), gwadel, kennevidel; kenstur eo o dedro gant dedro ar c'hankr : adfeilhañ a reont gant pep resmiad ha pareañ gant an ezvoudadur anezhañ.

paranoïa ◇ **paranoïa** ◇ **paranoïa g.** Termen gresianek amprestet en 19^t kantved gant e ster orin "diboellegezh, follezh", bet spisaet ha strishaet e erdal bep ma tiorree ar vredevezekniezh : abaoe deroù an 20^t kantved e reer *p.* eus an ambrenoù reizhiadek divrall hep displeberadur eus ar meiz; hiziv ez arverer kentoc'h *paranoïa* da arouezañ, evel adanv, ur psikoz dibarek, evel pennav, ar gouziviad anezhañ (sl. *para-noïaque : psychose ~*).

paranoïa sensitive, délire de relation des sensitifs ◇ **reference delusion** ◇ **paranoïa haezidik, ambren b. gemonedel an haezidion l.** (g.) Ambren o tizhout tud kizidik, anargadus, hec'hloaz, techet d'ar gouvid, hag int lorc'hek, ganto skiant lemm an divezouriezh, hag o tiabarzhñ laurus darempredoù ar pemdez buhez evel c'hwitadennoù hag annoazhadoù.

1 2 paranoïaque ◇ **1 paranoïc, paranoid, paranoïac 2 paranoïac** ◇ **1 paranoïak aa. 2 paranoïak g. -ed** 1 O taveiñ d'ar paranoïa (sl. *p. : constitution ~, p. : psychose ~, p. : structure ~*) 2 gouziviad ar psikoz paranoïak.

NOTENN : Er c'haozeeg e vez graet gant Gl. *paranoïaque, parano* gant un erdal ledan, da verkañ an dud techet da zisfiziout, da c'houellout.

paranoïaque : constitution ~ ◇ **paranoid personality** ◇ **genezh g. paranoïak** Tued o kevrediñ an emlorc'h, an diskred, faosted an ervredañ, an dic'halloud da emazasaat ouzh ar gedvuhez.

paranoïaque : psychose ~ ◇ **paranoïac psychosis** ◇ **psikoz g. paranoïak** Bredkleñved naouus dre un ambren desteriañ reizhiadek ha kempoell, haeret start hag andireadus, dezhi dodennoù kantaazel ha kemonedel (heskinerezh, meurded, serc'hvire, kevriniezh, gwarizi, hipokondriezh); reol e chom arc'hwelioù an dezevout, ar mennout hag an ober, hogen, dic'houest da gefaeziñ ha da berzhiañ er gedvuhez, ez eo douget ar c'hlañvour da derriñ kendivizadoù ha lezennoù ha da vont betek ar c'houlerezh.

paranoïaque : structure ~ ◇ **paranoid state** ◇ **luniad g. paranoïak** Furm un ambren reizhiadek, kempoell, kantaezek, o tinodiñ hag o tedeiñ hep ma vez darallet arc'hwelioù ar bred.

paranoïde ◇ **paranoid** ◇ **paranoidel aa.** E deroù an 20^t kantved e veze graet gant *p.* evit arouezañ psikoziou o tennañ d'ar paranoïa dre un ambren desteriañ, met digempeoll, dislenadek zoken, kevredet gant trezerc'hioù, ar c'hlañvour o chom estren d'ar gedvuhez nann dre ur wikefre gantaazel met dre vigantaezegezh hag angwerc'hadegezh; hiziv, ent klasel, ez arverer *p.* evit envel unan eus teir furm ar skizofreniezh (sl. *apragmatisme, catatonie, hébéphrénie, schizophrénie*, GBLF § 865).

paranomia ◇ **paranomia** ◇ **kammzeanv g., kammezluz g. deanviñ** Direizh al lavar, anezhañ lakaat war an traoù anvadoù nad int ket ar re voas (sl. *anomie*).

paraparésie ◇ **paraparesis** ◇ **treuzgouseizi g.** Seizi leiek an izili traoñ (sl. *paraplégie, parésie*).

parapareunie ◇ **extra vaginal coitus** ◇ **lezembar g.** Keventrac'h arallrev dre hentoù kevarall d'ar gouin.

parapexien ◇ **near the apex** ◇ **lez-kern aa.** O sezañ nes da gem ar galon.

parapharmacie ◇ **parapharmacy** ◇ **lezliaerezh g.** Teskad an traezoù anlaiek gwerzhet hep ordrenañ en apotikerezhioù hag er gourstaliou, amkanet d'ar yec'hedouriezh (toazioù dent, soavon, anroadoù), d'an aozadoù bouedouriezh ha gwezeladouriezh.

paraphasie ◇ **paraphasia** ◇ **1 kammerlec'h g. geriadel 2 kammenluz g.** 1 Termen bet savet gant Armand de Fleury e 1864 gant ar ster : darallad al lavar, anezhañ erlec'hiañ un hanc'her pe ur soniad ouzh un hanc'her pe ur soniad all. 2 Hiziv, anvad rumm an direizhoù geriadel : kammgevaot, kammzeluz, kammskriv, kammlenn, kammglev, kammerlec'h, kammgoun, gerestoue (Gl. *intoxication par le mot*).

paraphémie ◇ **paraphemia** ◇ **kammzeluz g.** Darallad al lavar komzet, anezhañ kammgomer ar gerioù (sl. *paraphasie, pararthrie*).

paraphimosis ◇ **paraphimosis** ◇ **amguldag g.** Tagelladur ar vezenn gant gweuz ar veskenn, re strizh, bet troñset a-dreñv ar gurunenn.

- paraphonie** ◇ **paraphonia** ◇ **kammvouezhpar g.** Darallad ar mouezhparañ, anezhañ un disklot etre ar sonioù ec'hodet.
- paraphrénie** ◇ **paraphrenia** ◇ **parafreniezh b.** Psikoz ambreel henek o teraoùñ peurliesañ goude an oad a 30 vloaz, naous dre ambrenoù puilh amreizhiadek, imbroudelloù faltaziek danzeet diwar drezerc'hioù ha gwengeloù, a ra komz eus *ambren dec'hmegadel*, *ambren imbroudellek* (sl. *délire d'imagination*); ne noter na strafuilh ar bersonelezh, na tuzumidigezh ar reizh na dedroadur etrezek an envedi; alies e talc'h ar gouziviad da berzhiañ azas er gedvuhez (sl. GBLF § 867).
- paraplégie** ◇ **paraplegia** ◇ **treuzseizi g.** Seizi an daou ezel krec'h, an daou ezel traoñ pe ar pevar ezel; arveret e vez an termen dreist-holl evit aroueziañ seizi an izili traoñ; diouzh an dro e komzer a t. *gwak* pe a t. *dasstrizhek* (sl. *konzo, lathyrisme, paraparésie, sclérose en plaques*).
- paraplégie spasmodique familiale de Strümpell et Lorrain** ◇ **Strümpell disease** ◇ **treuzseizi dasstrizhek familhel Strümpell ha Lorrain** Kleñved dibaot eus stroll an dic'henezhadurioù livenn-ilpenn a-hêrezh, treuzkaset peurliesañ er mod aotozomek trec'hek, o teraoùñ e-tro 20 vloaz hag o c'hrevusaat ent argammedek, naous *ent klinikel* dre seizi ha dargezet war astenn an izili traoñ, gerc'hted an damougoù a-stirenn hag arouez Babinski, azoniaid ilpennel ha tizhad an doneraeziañ, *ent neuziadurel* dre un divielinaat a 'r stiradoù pikernennek, a 'r stiradoù livenn-ilpenn hag a 'r pañsoù adreñv (sl. *hérédodégénérescence spinocérébelleuse*).
- parapraxie** ◇ **parapraxia** ◇ **lezandigon g., andigon g. dianandenaoud** Neuz andigon eilvedel d'an andenaoud: ar gouziviad ne oar ket Petra ober gant un draezenn nad eo ket evit he hennadiñ.
- parapsoriasis** ◇ **parapsoriasis** ◇ **parapsoriaz g.** Termen arveret da aroueziañ un niver kroc'henadoù eritem- pe krugenn-gourc'hennek: *p. takennaouek* (Gl. *p. en gouttes*), *p. likenevanek* (Gl. *p. lichénoïde*), *p. plakennaouek* (Gl. *p. en plaques*), h.a.
- parapsychologie, paraphysique** ◇ **parapsychology, paraphysic** ◇ **levredoniezh b., lezalvezoniezh g.** Studi anadennoù digunvez evel an *trozheniñ* (Gl. *télépathie, Sz. extrasensory perception*) a chom andispleget gant ar skiantoù (sl. La-12 284-287).
- pararéflexe** ◇ **parareflexia** ◇ **lezdamoug g.** Anadenn damouget gant ur vroudadenn o tevoudañ ent reol un damoug all, evel c'hweziñ ar fâs o kemer lec'h an halviñ da geñver ar chaokat.
- parasémie** ◇ **lezec'heul g.** Trozad an eztaoliñ meidel, direizh bredel a stader gant ar baranoiaked, da ziforc'hiñ diouzh direizhoù nerval an *anneulañ* evel an anveid pe an ankomz devoudet gant un anaf en empenn (sl. *amimie, aphasie, asémie, asymbolie, paramimie*).
- parasitaire** ◇ **parasitic** ◇ **1 arvevadel aa. 2 arvevadek aa.** 1 (Bevoniezh) a-zave d'an arvedaded. 2 A zoare gant an arvevaded.
- parasite¹** ◇ **parasite** ◇ **1 arvevat aa. 2 arvevad g. -ed** (Bevoniezh) 1 A-zivout ur bev oc'h emvagañ diwar goust ur bev all. 2 Hinienn (loen, struzhenn pe bakterienn) o vevañ, e-pad he hoali a-bezh pe un darn anezhañ, diwar goust un hinienn a spesad all en ur zaraññ alies yec'hed houmañ; *a. an den: protozoed* (amoeb, tripanozom, plasmodiom), *preñved* (plat ha ront, sl. *Helminthes*), *artropod* (c'hwen, laou, louezaeed, tarlask, moustiked), ar re-mañ o trezougen kleñvedoù liesseurt (paludegezh, bosenn, tifuz, h.a.); diforc'hiñ a reer an *amarvevaded* (Gl. *ectoparasites*), o vevañ war c'horre korf an danvevad hag an *enarvevaded* (Gl. *endoparasites*), o vevañ e diabarzh bevedeg o ostiz (sl. *hôte*, La-09 168 § 122).
- parasite²** ◇ **1 3 darankat aa., euverek aa. 2 4 darankad g.** (Bredoniezh) 1 A-zivout ambredennoù bred (skeudennoù, gerioù, kealioù) emouezet outo gant ar gouzrec'h daoust m'o anavez evel amoet. 2 Ambredenn darankat (sl. *mentisme, endophasie, hallucinose*, La-08 349). (Fizik) 3 A-zivout un anadenn o taremouezh gant un anadenn all hag ouzh he strafuilhañ, da skouer en amredoù stlennegel. 4 Anadenn darankat (sl. *bruit de fond, GEME 127 v° Larsen*).
- parasitémie** ◇ **parasitaemia** ◇ **gwadarvevadegezh b.** Bezañs arvevaded e-barzh ar gwad.
- parasiticide** ◇ **parasiticial** ◇ **1 arvevadlzh aa. 2 arvevadlzh g. -ioù** 1 A-zivout an araezioù arveret da zistrujañ an arvevaded. 2 Danvezenn arvevadlzh.
- parasitisme** ◇ **parasitism** ◇ **arvevadoniez b.** Aoz ur bevedeg o trigañ war c'horre pe e diabarzh ur bevedeg all, an *danvevad* (sl. *hôte*); kemm a lakaer etre 1) *gwirarvevadezh* (Gl. *p. vrai*), pa emvag an arvevad diwar goust an ostiz, da skouer an helmint, an hakrez, ar garvevion kleñvedus, 2) *kedvevadezh* (Gl. *symbiose*) pa vez kempouezh stabil etre arvevad ha danvevad, an eil o c'hounit korvo gant egile (sl. *microbiome*), 3) *gaouarvevadezh* (Gl. *pseudoparasitisme*), pa drig an arvevad en danvevad dre zarvoud, dinoaz ha digorvo, evel garvevion 'zo er fri pe er genoù.
- parasitologie** ◇ **parasitology** ◇ **arvevadoniezh b.** Diskiblezh o studiañ an arvevaded struzhel ha loenel.
- parasitophobie** ◇ **parasitophoby** ◇ **arvevadurur g.** Amgren mac'hennek da zastum ur c'hleñved kroc'hen arvevadel, an hakrez pergen; tredizhus eo an *a.*, e kemm ouzh an arurioù all.
- parasitose** ◇ **parasitosis** ◇ **arvevadegezh b.** Kleñved devoudet gant un arvevad.
- parasitotrope** ◇ **parasitotropic, parasitotrope** ◇ **arvevadkerc'h aa.** A-zivout un danvezenn en araez da lenañ ouzh an arvevaded e-barzh ar bevedeg.
- parasiter**
- *protozoaire parasitant l'intestin grêle de l'homme* protozoenn oc'h arvevata bouzellenn voan an den.
- parasomnie** ◇ **parasomnia** ◇ **lezhunad g.** Termen arveret gant H. Roger evit aroueziañ strafuilhoù ar c'houssked evel an hunvreoù, an hurlinkoù, an hunvaleerezh, h.a.

paraspasme facial bilatéral, spasme médian de la face ◇ **facial spasm, paraspasm** ◇ **dremmandag g. daoudu** Anez dibaoñ kenan, dedroat, naouus dre zargrezadoù dasstrizhek kigennoù an dremm, o teraouiñ alies dre gigennoù kelc'hennek al lagad (sl. *blépha-ropasme*) hag ar genoù.

parasytolie ◇ **parasytose** ◇ **lezalfad g.** Seurtad migorvez naouus dre ar vezañs, en tu all d'ar greizenn emgefren godel reol, ar c'hloñ god-kentez, eus ur greizenn all, allec'hiat, o werediñ dispan gant ur gorvez c'horrek; alese, e vez lanket korvez ar galon gwech gant an eil kreizenn, gwech gant eben; ur furn a zistroll dre zaremouezh eo (sl. *centre d'automatisme, hétérotope, interférence I*).

parathormone, hormone parathyroïdienne, PTH ◇ **parathormone, parathyroid hormone, PTH** ◇ **parathormon g., hormon arskoedennel, PTH** Hormon polipeptidek borc'het gant an arskoedennoù, kalkiomwadvec'huis, gourzhaler ar c'halkitonin; e roll eo arwastadiñ feur ar c'halkiom er bevedeg; gwerediñ a ra *a*) war an *askorn* p'en diouezer a-zoenadoù uhel, o teloezañ ar steuñvenn stank dre zilaoskiñ ar c'halkiom hag ar fosfatoù, *b*) war al *louezh*, dre vuiaat an troazhvec'h fosfatoù ha leiaat an troazhvec'h kalkiom, *c*) war ar *pervez*, dre vuiaat sugerezh ar c'halkiom ha, damasur, ar fosfatoù; dasperzhiañ a ra ivez e gwerederezh ar vitamin D hag, a du 'rall, en arwastadez ar pH dre azderc'hel an ion H⁺ (sl. *calcitonine, cholé-calciférol*).

parathyroéprive : syndrome ~, **hypoparathyroïdie** ◇ **hypoparathyrosis** ◇ **arskoedisvorc'hegezh b., azoniad olarskoedennel** Teskad an darvoudoù lemm pe henek o tarvezout da heul amzivenerezh pe isteñv an arskoedennoù : tetaniezh, gwad- ha troazhisvec'h kalkiom, usvroudadusted treloc'hel ha tredanel an nervennoù hag ar c'higennoù, a-wechoù razhekaennoù er parzhioù meizh, disleberadur a 'r bred ha dedro feudek (sl. *Fahr : maladie de* ~).

parathyroéose ◇ **parathyrosis** ◇ **paratireoz g.** Anez anfoel an arskoedennoù.

parathyroéotrope ◇ **parathyreotropic** ◇ **arskoedennergic'h aa.** En araez da werediñ war an arskoedennoù.

parathyroïde, glande parathyroïde, TA glandula parathyroïdea ◇ **parathyroid gland** ◇ **gwagrenn b. arskoed, arskoedenn b.** Gwagrennoù enborc'hat bihan, peder anezho, div uhelañ, div izelañ, lec'hiet peurliesañ a-dreñv tolbezenn gostezel ar skoedenn; dasperzhiañ a reont en arouleviañ kennevid ar c'halkiom hag ar fosfor (sl. *parathormone*).

parathyroïdennel ◇ **parathyroïdennel** ◇ **arskoedennevezhañ** Dilemel ur wagrenn arskoed, gwezh enneget pa vez us-teñvek ar wagrenn ha pa stader ur gwadusvec'h kalkiom diwar arc'hwelerezh reñverek an arskoedennoù.

parathyroïdite ◇ **parathyroiditis** ◇ **arskoedenngo g.** Tanienn ar gwagrennoù arskoed.

paratonie ◇ **paratonia** ◇ **aztant g.** Ezreolder an argrezañ : goude fiñval ur rann ezel, e-lec'h delaoskiñ ent diarvenn, e chom ar gigen ur pennad amzer war stegn, oc'h azderc'hel ar rann ezel en ul lakadur darsonnvane; seurt anadenn a stader alies gant al labaned; E. Dupré, kentrader an termen e 1911, a renke an *a.* en azoniad al *labanded loc'hadel* (Gl. *débilite motrice*).

paratyphlite ◇ **paratyphlitis** ◇ **lezsac'hennfo g.** Morfer gwiad kellaouek poull ar glun dehou.

parchemin ◇ **bruit de ~** ◇ **bruit de parchemin** ◇ **trouz g. parchenn** Trouz heñvel ouzh an hini a rafé div barchenn rimiet an eil ouzh eben, a glever a-wechoù e tro an amgalonnfo sec'h.

parectropie ◇ **parectropia** ◇ **kammzigon g.** Dewerc'hadur direizh fiñvadoù goulennet : meizet e vez an urzh ha kefleuniet adreuz, strafuill a stader gant gouziviaded an envedi beluzel (sl. *apraxie, paralysie générale progressive*).

parenchymateux ◇ **parenchymatous** ◇ **parenkimatus** A-zave d'ur parenkim a-gevenep d'ar gwiad kenglenel gouskor pe stroma (sl. *interstitiel, parenchyme, stroma*).

parenchyme, TA parenchyma ◇ **parenchyma** ◇ **parenkim g.** Gwiad hael, arc'hwelel, spesadel un organ.

parentéral ◇ **parenteral** ◇ **ampervezel aa., trewanel aa., a-drewan** A-zivout ebarzhiñ un danvezenn er bevedeg estreget dre hent ar benvegad koazhañ, eleze, da skouer, dre sankadennoù endan-groc'hen, enkaherel pe engwazhiennel.

parésie ◇ **parésia** ◇ **gouseizi g.** Seizi leiek o c'hoarvezout eus gwanadur an argrezusted (sl. *hémiparésie, paraparésie*).

paresthésie ◇ **paraesthesia** ◇ **1 mieraeg g. -ioù 2 kammeraez g. -ioù** 1 Merzhadenn ezreol : daleet, dreistpadet, kammlec'hiet, h.a. an eraezioù stokadel, laurel, gwrezel pe froumel. 2 Anglevad diaezus o tarvezout hep arbenn naouadus : kemenerion, kropadurioù, pikadurezh, santadennoù riv, tommderennoù, strishadennoù lec'hiek, h.a. (sl. *dyssthésie, jambes sans repos : syndrome des* ~).

NOTENN : En un arver strizh e tere ouzh Gl. *paresthésie*, Sz. *paraesthesia* an despizadur 2 diaraok, eleze "merzhadenn faos", hag ouzh Gl. *dyssthésie*, Sz. *dysaesthesia* an despizadur 1 : "merzhadenn darallet". Hervez an azerion e kaver eilpennadur an despizadurioù pe debarzh an daou ster d'an termen *paresthésie, paraesthesia*.

pariétal : syndrome ~ ◇ **parietal lobe syndrome** ◇ **azoniad kiternel** Teskad azonoù devoudet gant un anaf en dolbezenn gitem ha loet en tu kevenep d'an anaf, anezho strafuill er gougevaniañ hag en arverañ ar stlenn o tont eus an trobarzh : kammverzhout an emgorf, andigon luniañ, andigon arverañ, ankedre, istant ha, dreist holl, andenaod stekiñ, elfenn bennañ an azoniad kiternel (sl. *apraxie constructive, apraxie idéomotrice, astéro-gnosie, ataxie, autotopo-agnosie, Balint : syndrome de* ~, *cénesthésie, Dejerine : syndrome sensitif cortical de* ~, *Gerstmann : syndrome de* ~, *hypotonie, Russel : syndromes de* ~, La-09 322-323).

pariétal ◇ **parietal** ◇ **1 ~speur, speurel aa. 2 ~kitem, kiternel aa.** 1 A-zave d'ur speur, sk. : *enkalonnfo speurel* (Gl. *endocardite pariétale* pe *murale*). 2 A-zave d'an *askorn kitem* (TA *os parietale*, Gl. *pariétal*) pe d'an *dolbezenn gitem* (TA *lobus parietalis*, Gl. *lobe pariétal*).

pariétectomie ◇ **pariectomy** ◇ **speurezvenañ** Dazbidañ ur speur, peurgetket ur parzh ledek pe ledekoc'h eus speur ar brusk, oberatadenn dibaot kenan dewerc'het goude un adfeilh eus kankr ar vronn.

pariétographie ◇ **parietography** ◇ **speurluniñ** Skinluniñ speur un organ kleuz goude demeraat ar gwazhied anezhañ pe dre zargemm ouzh an tachadoù amezek leuniet gant an aer pe un Xdemerenn.

Parinaud : **conjunctivite de** ~ ◇ **Parinaud conjunctivitis** ◇ **kevresaefo g. Parinaud** Kevresaefo, untuek peurliesañ, gant koeñvadur ar malvennoù; stadañ a reer bolc'hennoù ha struzhennoù war gevresae ar malvennoù, c'hwarnnoù rakskouarn hag endan-c'haved hag a-wechoù azonoù ur pored hollek; dedreiñ a ra etrezek ar pare; treuzkaset e ve ar c'hleñved dre al loened (kleñved a'r skilfadou kizhier, sl. *griffes* pe *griffures de chat* : *maladie des* ~, tularemiezh, sl. *tularémie*).

Parinaud : **syndrome de** ~ ◇ **Parinaud syndrome** ◇ **azoniad Parinaud** Seizi diazerc'h ar sell, kevret a-wechoù gant seizi ar c'hensteudañ, gwech er fiñvoù diarvenn, gwech er fiñvoù diarzoug, gwech en eil re hag er re all war un dro; devoudet eo gant un anaf er pont pe en turumelloù krec'h ha traoñ (sl. *calotte* : *syndromes de la* ~ *pédonculaire*, *tubercules quadrijumeaux* : *syndrome des* ~, La-18 80, 249-252).

Parker : **syndrome de** ~ ◇ **prune-belly syndrome** ◇ **azoniad Parker** Teskad kammneuziadoù : ezreolderioù troazhganadel (usvoll forzhioù an troazh, lounezhfoeñv, kellezlec'h), angwe kigennoù ar c'hof, roufennegezh kroc'hen ar c'hof (kof prunevenn) (sl. *Obrinsky* : *syndrome d'*~).

Parker et Jackson : **sarcome de** ~ ◇ **Parker and Jackson reticulum cell sarcoma** ◇ **sarkom g. Parker ha Jackson** Anaev dibaot, limfosarkom evodet diouzh kelligoù limfoidel eus ar mel o sezañ war ardalpenn an eskern hir; dedreiñ a ra e rezh dasseziou ha gwazhañ ar c'houreved oadour dreist holl; e renkañ a reer e stroll al limfomoù yud anhodgkinek (sl. *lymphome malin*, *sarcome*).

Parker-Hare : **signe de** ~ ◇ **Parker-Hare sign** ◇ **arouez b. Parker-Hare** Ar meilh dorn o vezañ serret war ar meud pleget, e tremen oefs pellek ar meud hebiou da ribl diavaez ar palv; an arouez-mañ, gwiriet dre skinluniñ, a ra gousellout un azoniad Marfan (sl. *Marfan* : *syndrome de* ~).

Parkinson : **maladie de** ~, **paralysie agitante** ◇ **Parkinson disease, shaking palsy** ◇ **kleñved Parkinson, peluz g. hejañ** Anaev hennadek o teraouiñ goude 50 vloaz gant ar c'houreved peurliesañ, naouus, *ent neuziadurel* dre un anaf er rizennegezh hag er steuñvenn du, *ent klinikel* dre ur c'hren er paouez, muiek er bizied, un anfiñv hag ur reuter kaherel a laka war ar gouziviad un emstumm soutet, (plegadur leiek an divc'har hag an divrec'h, kef stouet), un dremm sonnet (enebrezh parkinsonek), oc'h erzerc'haat un divig eus reizhiad dopaminwerc'her an empenn (sl. *dopamine*, *dopaminergique*, *extrapyramidal* : *syndrome* ~, *idiopathique*, *Lewy* : *corps de* ~, *locus niger* : *syndrome du* ~, *noyaux basaux*, *striés* : *syndromes* ~, *virus lents* : *maladies à* ~).

parkinsonien ◇ **parkinsonian** ◇ **1 parkinsonek** aa. **2 parkinsonek** **3 parkinsoneg** g. -eion **4 parkinsonvanek** aa. 1 A-zave da gleñved Parkinson. 2 Gant kleñved Parkinson. 3 Gouziviad kleñved Parkinson. 4 A-zave d'un azoniad eilvedel a orin empennfoel, gwazhiedel, pistriel pe liael o vodañ anfiñv, kren er paouez hag ustant.

NOTENN : Enepster a ra an aozerion en arver an termenoù gallek ha saoznek. Goude kevenebiñ an azoniadoù hennadek hag eilvedel en o despiadur eus kleñved Parkinson, ez arloont an un deverad Gl. *parkinsonien*, Sz. *parkinsonian*, ouzh an daou rumm azoniadoù.

parkinsonisme ◇ **parkinsonism** ◇ **parkinsonegezh** b. Kevredet anfiñv, kren er paouez, ustant a stader war un dro e *kleñved Parkinson* (hennadek) hag en azoniadoù parkinsonvanek (eilvedel).

parodontie ◇ **periodontics** ◇ **amzantennouriezh** b. Rann eus an dentouriezh o plediñ gant gwiadoù gouskor an dant : askorn al logig, an diraskorn hag ar gwiad kenglenel en dro da wrizienn an dant.

NOTENN : Meur a gemmad zo bet en anvadurezh an elfennoù loet en dro d'an dant. An elfenn bet anvet a-raok PNA : Gl. *ligament alvéolo-dentaire*, *périoste alvéolodentaire*, *desmodonte* ha gant PNA : *periodontium*, zo arouezet gant TA : *desmodontium*. A du 'rall, gant TA e talvez *desmodontium* teskad ar gwiadoù loet etre an dant hag askorn al logig dant. E Frañs, e kendalc'her d'ober gant an termen kefridiel *parodontie* evel anv an arbennigiezh. Kinnig a ran reiñ Br. *amzantenn* da gevatal da TA *desmodontium* (sl. *desmodonte*).

parodontite, desmodontite ◇ **parodontitis, desmodontitis** ◇ **amzantennfo** Tanijenn gwiadoù gouskor an dant.

parodontolyse ◇ **parodontolysis** ◇ **amzantennloezañ, amzantennloez** g. Distruj an amzantenn.

parodontose ◇ **periodontosis, desmodontosis** ◇ **desmodontoz** g. Anaev dic'henezhadel an amzantenn o tisoc'h gant al logigloez ha kouezh an dant (sl. *alvéolyse*).

parole en miroir ◇ **mirror speech** ◇ **komz b. a-zrec'h** Direizh ar gomz leteñvel ouzh ar skrivañ a-zrec'h (sl. *écriture en miroir*) : ginadur gwech ar gerioù er frazenn, gwech al leñvennoù, gwech ar soniadoù er ger.

paromphalocèle ◇ **paromphalocèle** ◇ **lezvegologad** g. Aveleñ a-dreuz speur ar c'hof e kefin ar begel.

parophtalmie ◇ **parophthalmia** ◇ **lezlagadfo** g. Tanijenn ar gwiadoù en dro d'al lagad (ar malvennoù, h.a.).

paropsie ◇ **paropsis, dysopsy** ◇ **kammwel g., miwel** g. Strafuilh a'r gweled (termenoù hollek, arveret dibaot).

parexie ◇ **parexia** ◇ **kammavez** g. Anvad genadel gwariadoù an ilboud, evel ar *pika*, ar *malakia* (sl. *appétit*, *malacia*, *pica*).

parosmie ◇ **parosmia** ◇ **kammc'hwesh**a g. Gwariad ambreek ar c'hwesh, trezerc'hañ padek pe padennek c'hwezhiou, fall peurliesañ (sl. *cacosmie, dysosmie, ozène, pseudosmie*).

parostal, parostéal ◇ **parosteal** ◇ **araskornel** aa. A-zave d'ar gwriad kellaouek doues loet en dro d'an amaskornenn.

parostéite ◇ **parosteitis** ◇ **araskornennfo** g. Tanienn ar gwriad kellaouek araskornel.

parotide : **glande** ~, TA **glandula parotis** ◇ **parotid gland** ◇ **gwagrenn gilvoc'h, kilvoc'henn** b. Tevañ gwagrenn halviñ, loet a-dreñv barr ar c'haved ha treuzet gant ar garotidenn diavaez, gwazhienn diavaez ar c'herc'henn ha nervenn an dremm; he c'hanol degorzhañ a ra TA anezhi *ductus parotidæus* (Br. *san ar wagrenn gilvoc'h* pe *san a-gilvoc'h*, Gl. *canal de Sténon*).

parotidectomie ◇ **parotidectomy** ◇ **kilvoc'hennezvenañ** Dilemel hollel pe darnel ar wagrenn gilvoc'h.

parotidite ◇ **parotiditis** ◇ **kilvoc'hennfo** g. Tanienn ar wagrenn gilvoc'h, alies a orin viruzel (sl. *oreillons, Rubulavirus*), stadet ivez a-wechoù e-kerz souzvezh poreoù 'zo (tifoid, terzhienn eskorvezhel).

paroxysme ◇ **paroxysm** ◇ **grezvarr** g. E dedro ur stad kleñvedel, prantad ma vez an azonou en o lemmded uc'hek.

Parrot : **pseudoparalyse** ou **maladie de** ~ ◇ **Parrot pseudoparalysis** ◇ **kleñved pe gaouseizi Parrot** Andrafted loc'hadel laurus o wazhañ un pe lies ezel, o tarvezout gant sifiliteon c'hanedigel ken abred hag an oad kentañ; gant ar skinlun e stader torrou en ardallenn hag ouzhpenn se, a-wechoù, anafoù eskern diseurt : osteokondroz, gomou, amaskornennfo askorneiat (sl. *ostéochondrite, périostite ossifiante*).

Parsonage et Turner : **syndrome de** ~ ◇ **Parsonage-Turner syndrome** ◇ **azoniad Parsonage ha Turner** Azoniad naouus dre zinod trumm ul laur er skoaz, heuliet gant ur seizi a rizh trobarzhel eus kigennoù gouriz an ezel krec'h, ur c'haberistefiv muiek hag un isereaz gorrefraouadel eus tiriad ar seizi; darvezout a ra gant an oadourion yaouank ha dedreñ etrezek ar pare; dianav eo e arbenn (sl. *neuropathie tomaculaire*).

part ◇ **1 parturition** **2 newborn** ◇ **1 eskorad** g. **2 eskored** g. -**idi** 1 Ganedigezh. 2 Nevezc'haned, termen eus lavar ar gwir.

parthénogenèse ◇ **parthenogenesis** ◇ **gwerc'hgenel** Genel bevion 'zo hep frouezhigiñ.

parthénologie ◇ **parthenology** ◇ **gwerc'hezouriezh** b. Diskiblezh vezegel o plediñ gant benvegad genel ar plac'hed gwerc'h.

parturiente ◇ **parturient woman** ◇ **eskoradurez** b., **gwilioudadez** b. Maouez o wilioudiñ pe o paouez gwilioudiñ.

parturition ◇ **parturition** ◇ **1 eskoriñ, eskorad** g. **2 eskoriñ, eskorad g., treiñ, troadur** g. 1 Gwilioudiñ naturel. 2 A-zivout ar bronneged, genel re vihan.

parulis ◇ **parulis** ◇ **paruliz** g. Gor ar munsun, rouestlad eus morfer an amzantenn.

Parvovirus ◇ **Parvovirus** ◇ **Parvovirus** Genad viruzoù gant DNA, bihanvent (etre 15 hag 23 nm), 32 gapsomer en o c'hapsid; en den, e vezont kevelat d'an adenoviruzoù : ne c'hellont tiñvañ nemet er c'helligoù poreet gant un adenoviruz; el loen, e tiñvont o unan.

pascal ◇ **pascal** ◇ **paskal** g. Unanenn wask ha destrizh (arouez Pa, atalad mentawouriel : $ML^{-1}T^{-2}$) : gwask pe destrizh o werediñ war ur c'horreenn blaen $1 m^2$ gant un nerzh 1 newton; 1 atmosfer zo par da e-tro 10^5 Pa; er vezekniezh ez arverer ar c'hilopaskal (kPa), par da 1 000 Pa; e se, 1 mmHg = 0,135 kPa, 1 kPa = 7,5 mmHg; da skouer, ur gwask talmerel 14–9 cmHg a rezhienner 19–12 kPa.

passage à l'acte, acting out ◇ **acting out** ◇ **darwezhiñ** Real darluskek ha feuls, darwantus alies (muntr, emlazh, gwaller-ehz), deveizet evel ur furn eus distro an arvousted (sl. GBLF § 19).

passeurs de drogue : **syndrome des** ~ ◇ **body-packer syndrome** ◇ **azoniad ar gluderion drammm** pe **an drammmgluderion** Pistriadur lemm dre ar baderioù (kokain, heroin) o tarvezout pa freg er ganol vezhur pakadur ar sac'hadigoù drammm bet euvret gant ar gluderion evit tremen hebiou da furcherezh ar valtouterion; rouestlet e vez a-wechoù gant un antreizh pervez treloc'hel.

(-)**pass-, passag-**

- *bande passante* bann drafet, draf
- *by-pass* heptreug
- *canal livrant passage à l'artère* kanol, lec'h tremen
- *pe* ma tremen *pe* o tremen drezi an dalmerenn
- *coma dépassé* trac'homa, koma andizhek, koma dieitro
- *crampe passagère* glaz tremeniat
- *faire l'impasse* sur skoeviñ
- *forme passagère d'agnosie* furn badennek a andenaoud
- *formes de passage* furmoù ardeuz
- *la phalange distale du pouce dépasse le bord externe de la paume* e tremen oefs pellek ar meud hebiou da ribl diavaez ar palv
- *le passage des rayonnements dans un gaz* tremen ar skinadoù dre un aezhenn
- *le passage du chlore à travers la membrane cellulaire* treizh ar c'hlor a-dreuz koc'henn ar c'helligoù
- *mydriase passagère* mabusvoll berbad
- *obstacle permanent ou passager* skoilh padek pe dibad
- *parasite en impasse chez l'homme* arvevad hentbac'hat en den
- *passage anormal du glucose dans les urines* tremen ezreol ar glukoz en troazh
- *passage de Boll* forzh Boll
- *passage* pe
- *canal de Hering* forzh Hering
- *passage étroit* strishaenn
- *passe bas, passe haut* draf izel, draf uhel
- *passeur de drogue* enbec'hier, kluder drammm, drammmgluder
- *sans passer par les poumons* o skoeviñ ar skevent
- *temps de passage du courant* pad arloañ ar red tredan
- *tube permettant le passage de l'air* pib o reiñ hent d'an aer.

passivité ◇ **muscular passivity** ◇ **gouzañvadezh** b. **kigennel** Arouez istant, anezhi leiadur an harzder andiarvenn reol eus ur rann ezel ouzh al loc'hadoù a c'houlanker outi ha muiadur an ampled anezho.

Pasteur : **réaction de** — ◇ **Pasteur reaction** ◇ **dazgwered** g. **Pasteur** Lankad eus ar c'hennevid kelligel o tisoc'h, dindan delanvad anadennoù oksiderezh, gant kildreuzfurmiñ e glukidoù un darn vras eus an drenkenn laktek furmet he unan a-ziagent dre berzh goidigezh glukidoù end-eeun : anadenn enaozañ a stader alies e-kerz an analerezh kelligel.

Pasteurellaceæ ◇ **Pasteurellaceae** ◇ **Pasteurellaceae** Kerentiad bazheloù Gram— anaerat anret, gougevret outañ ar genadoù *Pasteurella* hag *Haemophilus*.

pasteurellose ◇ **pasteurellosis** ◇ **pasteurelloz** g. Termen milvezekniezh oc'h erdalañ ar gwadlestegezhioù gwadliñvek (tifoid ar marc'h, kolera ar yer, gwadlestegezh wadliñvek an dañvad, an ejen, ar moc'h, h.a.) kiriek dezho *Pasteurella multocides*; teir furm *p. denel* ez eus : ar vosenn (kiriek dezhi *Yersinia pestis*), an dularemiezh (diwar *Francisella tularensis*) hag un trede, an hini nemeti skritellet *pasteurelloz*, ar *p.* diwar *Pasteurella multocides*, pell a vezañ ken grevus hag ar *p.* loenel, o tedreiñ gwech evel ur poread lec'hiek er poent enkorañ, gwech evel ur c'hrezenno, ur pilhonfo pe ur wadlestegezh.

pasteurisation ◇ **pasteurization** ◇ **pasteurekaat**, **pasteurekadur** g. Tommañ da 70-75°C e-doug 20 da 30 min ul liñvenn c'hoadus hag he yenaat trumm; arloet ouzh al laezh, ar *p.* a zistruj an darn vuiañ eus an hadennoù kleñvedus (bazhilli an tifoid, ar c'holera, an dorzhellegezh), hep daskemmañ an danvezennoù proteek (darallet ar re-mañ gant ar birviñ), o kevaraezañ ur viridigezh 2 pe 3 devezh.

Pastia : **signe de ~** ◇ **Pastia sign** ◇ **arouez b. Pastia** Regoù purpura o sezañ er plegoù ilin e-kerz dispuilh ar skarlegenn.

pastorien ◇ **pertaining to Pasteur** ◇ **pasteurek** aa. A-zave da Louis Pasteur, kimiour ha bakteriour (1822–1895).

Patau : **syndrome de ~**, **trisomie 13** ◇ **Patau syndrome**, **trisomy 13** ◇ **azoniad Patau**, **trizomiezh b. 13** Seurtad trizomiezh ma vez loet ar c'hromozom dreistniver war an 13^{re} kromozomoù somatek, naouus dre gammeuziadoù liesel : ment vihan ar penn (korr-gloppenegedh), tal flead, gaved isteñvek, boulc'h daoudu, fri arblat, divskouarn distoket, malvennoù kloz o kuzhler ar gorrlagadegedh hag ezrelderioù all eus an daoulagad, bizied distummet war bleg, angiamoù plaen, direizhoù nerved (ustant, glizi, labanded, kammneuziadurioù ar flugez, ar galon pergen; dedreiñ a ra etrezek ar marv dindan 3 miz.

patch ◇ **patch** ◇ **1 peñsel** g. **2 teltan** g. 1 Araezad serriñ ur flañchad surjaniel pe un enloezad kleñvedel en un organ kleuz dre grafaelañ ouzh ar brielloù anezho ur pezh degaset a lec'h all : gwiad pe organ erlamet diouzh ar gouziviad e unan pe osod kevanaozel, da skouer un tammad bronkez ambenet evit barrañ un odead pe parraat ouzh un isvoll briant-bronkez. 2 Pegasus bihan arveret evit diounit un danvezenn dre an hent treuz-kroc'hen (sl. *épicutané* : *test* ~).

pâte ◇ **paste** ◇ **toaz** g. (Apotikerezh) Ogan tevoc'h dre berzh ar vezañs ennañ eus ur feur poultr brasoc'h (sl. *baume*, *crème*, *embrocation*, *liniment*, *onguent*, *pommade*, La18 289-292).

patella, **rotule**, **TA patella** ◇ **patella** ◇ **padelleg** g. Sezameg loet e talbenn arak ar glin e-barzh stirenn ar gigenn bevarfennek.

patella bipartita ou **partita**, **maladie de Gruber** ◇ **patella bipartita** or **partita** ◇ **padelleg divrann**, **kleñved Gruber** Ezreolder ganedigel ar padelleg, naouus dre ar vezañs eus daou pe lies poent askornaat ouzhpenn, o tedreiñ a-zisrann, warno er skinlun neuz un torr.

patellectomie ◇ **patellectomy** ◇ **padellegezvenañ** Dilemel ar padelleg.

patellite ◇ **patellitis** ◇ **padellegfo** g. Tanijenn ar padelleg (sl. *Sinding-Larsen-Johansson* : *maladie de ~*).

patelloplastie ◇ **patelloplasty** ◇ **padellegateliñ** Dazluniañ surjaniel ar padelleg goude un torr.

patence : **période de ~** ◇ **patent period** ◇ **prantad diskelez** g., **diskelvezh** g. Mare eus un arvevadegezh ma c'haller dinoñ an arvevad gant ar gouziviad (sl. *latent*).

1 pathergie, **parallergie**, **coallergie** **2 pathergie** ◇ **1 parallergy** **2 pathergy** ◇ **1 lezallergiezh** b. **2 patergiezh** b. 1 Erwezh o tarvezout gant gwiadoù 'zo (ar c'hroc'hen da skouer e tro ar c'hroc'henerwezh), n'eo ket hepen ouzh an allergen ez eo bet kizidikaet ar gouziviad outañ, met ivez ouzh un pe lies allergen a spesadoù all; anadenn a stader dreist holl pa vez nevezc'hraet ha kreñv ar c'hizidikadur. 2 Teskad erzerc'hadoù kleñvedel an allergiezh.

pathergy-test ◇ **pathergy-test** ◇ **pathergy-test** g. (l. : -s) Erwezh kroc'henek spesadel reñverek dec'hanez gant an daraezioù hag ar sankadennoù a stader gant gouziviaded kleñved Behçet.

pathogène ◇ **pathogenic** ◇ **kleñvedus** aa. O tec'han ur c'hleñved (sl. *saprophyte*).

pathogénèse, **pathogénésie**, **pathogénie** ◇ **pathogenesis** ◇ **1 ardarzh** g. **2 ardarzhouriezh** b. 1 Argerzh an dec'han hag an dedro eus ur c'hleñved adal an arbennoù anezhañ. 2 Studi ardarzh ar c'hleñvedoù.

pathogénicité, **pouvoir pathogène** ◇ **pathogenicity** ◇ **kleñvedusted** b. Gallusted da zec'han ur c'hleñved.

pathogénique ◇ **pathogenic** ◇ **1 ardarzhel** aa. **2 ardarzhourel** aa. 1 A-zave d'an ardarzh. 2 A-zave d'an ardarzhouriezh.

pathognomonie ◇ **dienverkouriezh** b. Studi an arouezioù piaouel d'ur c'hleñved.

pathognomonique ◇ **pathognomonic** ◇ **dienverkus** aa. Naouus d'ur c'hleñved ha dezhañ nemetken, sk. : sellet evel arouez dienverkus ar ruzell (sl. *Koplik* : *signe pe tache de ~*).

pathologie ◇ **pathology** ◇ **kleñvedouriezh** b. Studi ar c'hleñvedoù; termen arveret gant un hogozenn evit aroueziñ rannoù an diskiblezh : *k. analadel* (Gl. *p. respiratoire*), *k. vicherel* (Gl. *p. profes-sionnelle*), h.a. (sl. *anatomie pathologique*, *anatomopathologie*).

NOTENN : Ankewer eo arver Gl. *pathologie* gant ar ster "kleñved". Kewer eo avat arver Gl. *pathologie* e-lec'h *anatomopathologie* (sl. *pathologie*).

pathologie comparée ◇ **comparative pathology** ◇ **kengleñvedouriezh** b. Studi keverata an adanennoù kleñvedel etre ar spesadoù loened; diskiblezh o studiañ ivez ar c'hleñvedoù treuzkaset etre an den hag al loened.

pathologie externe ◇ **external pathology** ◇ **kleñvedouriezh diavaez** Rann a 'r gleñvedouriezh o studiañ ar c'hleñvedoù pe an anafoù *a*) o sezañ e gorre ar c'horf, *b*) o rekizañ an arver eus ar surjianerezh.

pathologie générale ◇ **general pathology** ◇ **kleñvedouriezh hollek** Rann a 'r gleñvedouriezh o studiañ an elfennoù boutin etre an holl gleñvedoù (arbennoù, anafoù, azonoù) ha n'eo ket e stern kleñvedoù dibarek.

pathologie interne ◇ **internal or medical pathology** ◇ **kleñvedouriezh diabarzh pe vezegel** Rann a 'r gleñvedouriezh o studiañ ar c'hleñvedoù o sezañ e diabarzh ar c'horf pe ez a outo ar yac'hadouriezh dre araezioù mezegel (ha n'eo ket surjaniel) (sl. *médecine interne*).

NOTENN : Boas eo an embregourion hag an aozerion da arverañ Br. *mezegel*, Gl. *médical*, Sz. *medical* ken a-zave da “arz da brederiañ ar c'hleñvedoù”, ken a-gevenep da Br. *surjaniel*, Gl. *chirurgical*, Sz. *surjical*.

pathologique ◇ **pathological** ◇ **1 kleñvedek aa. 2 kleñvedel aa.** 1 Gant doare ur c'hleñved, ezreol, sk. : *un amgren kleñvedek eo an arur.* 2 A-zave d'ar c'hleñved, sk. : *studi an anadennoù kleñvedel.*

1 pathologiste 2 pathologiste, anatomopathologiste ◇ 1 pathologist 2 pathologist, anatomic pathologist, anatomopathologist ◇ 1 kleñvedour g. -ion, naouedour g. -ion 2 kleñvedour, neuzkleñvedour g. -ion 1 Arbennigour war ar gleñvedouriezh. 2 Arbennigour an imbourc'h meur- ha korrselladel war an daskemmoù kleñvedel er gwiadoù bet bevsavet pe erlamet diouzh ar c'helhan, renet dre araezioù kempred ar gelligouriezh, ar wiadkimiezh, ar wiadenzimouriezh, an hangaeouriezh, h.a. (sl. *anatomie pathologique, pathologie*).

pathomimie, trouble factice ◇ pathomimia, factitious disorder ◇ derc'hanaez g., strafuilh g. erwereat Strafuilh nes d'ar gaouvar, naouus dre an ezhomm diarvenn da zarneuziañ kleñvedoù bredel, arc'hwelel pe organel dre erwereañ azonoù ha zoken anafoù ha gloazadoù graet a-zevri gant ar gouziviad e unan o vont a-wechoù betek an emvturniañ ; e kemm ouzh ar fincher, e van an derc'hanaezeg diemouez ouzh e luskedoù : ne glask ket tennañ splet kemonedel eus e realezh (sl. *factice, hystérie 2, Lathénie de Ferjol : syndrome de ~, Münchhausen : syndrome de ~, mythomanie, simulation*).

pathotype, pathovar ◇ pathovar ◇ patovar g. -où Strolladur korreveion, a un rummad pe get, dezho an un kleñvedusted.

patrimoine génétique ou héréditaire ◇ genetic heritage or inheritance ◇ glad g. hilel pe hêrezhel Teskad ar gen e kerz un hinienn (sl. *caryotype, génome, génotype*).

patte d'oie : muscles de la ~, TA pes anserinus ◇ crow's foot muscles ◇ kigennoù ar pav gwaz Stroll an teir c'higenn loet e lodenn grec'h-diabarzh ar skin : *k. gemener* (TA *musculus sartorius*), *k. voan* (TA *m. gracilis*) ha *k. hanterstirennec* (TA *m. semitendinosus*).

paucisymptomatique ◇ ◇ **nemeurazonek aa.** A-zivout un anaev a zo dezhañ nebeut azonoù.

Paul-Bunnel-Davidsohn : réaction de ~ ◇ Paul-Bunnel-Davidsohn test ◇ dazgwered pe proud Paul-Bunnel-Davidsohn Dazgwered naouus d'ar mononukleoz poreel ; e-barzh gwadveiz gouziviaded ar c'hleñved-se e vez aglutininou spesadel (antikorfou heterofil eus ar stroll IgM) o vuiaat a-vas e c'halloud da zazgludañ hemati an dañvad ; da notañ ez eus degouezhioù mononukleoz poreel ma vez nac'hek proud *P.-B.-D.* (sl. *agglutination, agglutinine, mononucléose infectieuse*).

paupières, TA palpebrae ◇ eyelids ◇ malvennoù l. (b.) Lienennoù o wareziñ parzh araoak al lagad, ledekoc'h ar *m. uhelañ* eget ar *m. izelañ* ; pep malvenn zo ouzh he ober un talbenn gorre, kroc'hene, hag un talbenn don, kenglenel, o c'holeiñ migorn an tarz (TA *tarsus palpebrae*) ha lodenn valvennel kigenn gelc'hennek al lagad (TA *musculus orbicularis oculi*) ; war ar ribl rez anezho emañ ensteudet ar maldudennoù.

Péan : opération de ~ ◇ Bilioth operation ◇ gwezh g. Péan Dazbid ar porzhier hag ar vougev a-ser gant an dasforzhad kreuz-daouzegenn.

Pearson : syndrome de ~ ◇ Pearson syndrome ◇ azoniad Pearson Anaev mitokondriel dibaot kenan a stader gant ar vugale, anezhañ kevreted un amwad makrokitel kilvers, ur vakuolekaat a 'n diaraogerioù eritroblastel ha granulokitel eus ar mel eskern hag ur skorted ezvorc'hadel a 'n ilgreiz.

peau, TA cutis ◇ skin ◇ kroc'hen g. Organ lienennek tev, bouk, gwevn, dastennek hag anhedreuz o c'holeiñ ar c'horf, kevarall e livezh hervez an dud ha lec'hioù ar c'horf, ouzh e ober daou welead gorre, an ezkroc'hen pe epiderm (TA *epidermis*, sl. *épiderme*), war an donenn pe derm (TA *corium, dermis*, Gl. *derme*, sl. *chorion*), hag ur gwelead don, ar c'houdonenn (TA *tela subcutanea*, sl. *hypoderme*), enni ar gollc'hedan behin (TA *panniculus adiposus*, sl. *pannicule adipeux*) ; lodek er c'hroc'hen emañ gwagrennoù ar soav, ar gwagrennoù c'hwezpar, ar c'horfigoù stekiñ hag ar faner (blev, ivinoù, dent, h.a., sl. *phanère*).

peau de chagrin ; plaques en ~ ◇ sharkskin spot ◇ pannoù kroc'hen rinkin Plakennoù kroc'hen ardev, roufennek, o sezañ boas er rannbarzh dargreiz-kroazell, dezverkus d'an epiloia (sl. *sclérose tubéreuse du cerveau*).

peau d'orange : aspect ou phénomène de la ~ ◇ orange peel skin ◇ kroc'hen plusk orañjez Pukennigoù poentek e-barzh ar c'hroc'hen o c'holeiñ un tachad gouliñv, deun pep poent o vezañ igorenn ur wagrenn c'hwezpar, neuz a stader pergen da geñver kankr ar vronn, pa vez stanket limfforzhioù ar c'hroc'hen gant kelligoù kankrek.

peaucier : signe du ~ ◇ Babinski platysma sign ◇ arouez b. ar platysma Pa vez ul ledseizi ez eo gwanoc'h argrezadur kigenn blat ar gouzoug (TA *platysma*, sl. *platysma*) en tu seizet.

péché originel antigénique ◇ original antigenic sin ◇ pec'hed g. kentañ antigenel Anadenn a stader pa vez antigenoù un den bet vaksinet pe poreet gant ur viruz o vuiaat a-greñv goude ar vaksinañ pe ar poreañ gant un eil viruz kerentiet d'an hini kentañ ; kevan e chom ar vemor hangael piaouet da geñver keraez ar viruz kentañ (sl. *mémoire immunologique*).

pectoral ◇ **pectoral** ◇ **˘brennid, brennidel** aa. A-zave da lodenn arak ar brusk, sk. : *kigenn vras ar brennid* (TA *musculus pectoralis major*).

pectoriloquie ◇ **pectoriloquy** ◇ **brusklezañ, brusklezerezh** g. Daskemmadur ar vouezh merzhet dre ar selaouennañ : hañvalout a ra dont war eeun eus ar brennid dre ganol ar stetoskop, arouez ar vezañs eus mougevioù bas er skevent; *b. anvouezhiek* (Gl. *p. aphonique* pe *aphone*, Sz. *aphonic p.*) : pa arloer ar stetoskop ouzh speur ar brusk, e klever fraezh ar vouezh kuzuliket, arouez ur fennadur levrifibrinek er c'hrezoù, ezvezant avat e tro ar c'hrezennfoioù linek.

pédale : **signe de la** ~ ◇ ◇ **arouz b. an droadikell** Kren ar c'har, hewel pa harp ar gouziviad beg e droad war al leur, anadenn stadet e kleñved Basedow.

pédiatre ◇ **pediatrician** ◇ **mabour g. -ion** Mezeg arbennikaet war vezekniezh ar vugale.

pédiatrie ◇ **p(a)ediatrics** ◇ **mabouriezh b.** Arbennigiezh vezegel o plediñ gant kleñvedoù ar vugale.

pédiculaire ◇ **1 lousy 2 pedicular** ◇ **1 laouek** aa. **2 ˘laou, laouel** aa. 1 Laou gantañ. 2 A-zave d'al laou, sk. : *kleñved al laou*, Gl. *maladie p.* (sl. *pédiculse, phtyriase*).

pédicule ◇ **pedicle** ◇ **troadig g., gwriizenn b., troadenn b., funellb.** (Neuziadurezh) Lodenn strishoc'h o keneren un organ ouzh ur rannbarzh eus ar bevedeg, sk. : *troadig gwareg ar vellenn* (TA *pediculus arcis vertebralis*, Gl. *pédicule vertébral*), *gwriizenn ar skevent* (TA *radix pulmonis*, Gl. *pédi-cule pulmonaire*), *troadenn un ogad* (Gl. *pédicule d'une hernie*), *funell dalmerel ur yoc'henn* (Gl. *pédicule artériel d'une tumeur*).

pédicul-

• *ectopie des méninges possédant un pédicule étroit, presque toujours imperméable* aveleñn ar pilhon dezhi un droadenn strizh ha dall hogos bepred • *malformation pédiculée* kammneuziad troadennek • *molluscum pédiculé* molluscum troadennek • *pédicule épidiymotesticulaire* funell a zo a-skourr drezi ar glidenn hag an argell • *pédicule rénal* begel al lounezh • *un lambeau vésical pédiculisé et tubulisé* un drailhenn c'hwezhi-gell ledenezet ha dolennet.

Pediculinae, Pédiculinés ◇ **Pediculinae** ◇ **Pediculinae l., Pedikulined** Iskerentiad eus ar *Pediculidae*, urzhad an *Anoplurae*, gougevret dezhi ar genadoù *Pediculus* (laou) ha *Phtirus* (laou pafalek).

pédiculse ◇ **pediculosis** ◇ **laouegezh b.** Anaez kroc'henn dec'hanet gant al laou (sl. *phtyriase, pou*).

pédicure ◇ **chiripodist** ◇ **troadaezour g. -ion** Eiler mezegel o prederiañ anaezioù gorre an treid (kaledennoù, beskarnoù, ivinoù sanket, h.a.), ivez oc'h arouelañ an treid bonan (sl. *podologie*).

pédiluve ◇ **pédiluvium** ◇ **treidolc'h g.** Soubañ an treid (sl. *manuluve*).

pédiométrie ◇ **p(a)edometry** ◇ **mabvuzulierezh g.** Teskad an hentennoù arveret evit andalañ kresk ar vugale (sl. *anthropométrie*).

pédodontie ◇ **p(a)edodontics** ◇ **mabdentioniezh b., mabdentouriezh b.** Dentoniezh ar vugale (sl. *art dentaire, odontologie*).

NOTENN : Evel Gl. *odontologie*, Sz. *odontology*, e vez arveret Gl. *pédodontie*, Sz. *p(a)edodontics* en daou gemeradur dentoniezh ha *dentouriezh*, sl. *odontologie* NOTENN.

pédogenèse ◇ **p(a)edogenesis** ◇ **1 mabardarzh g.** Hollad argerzhioù ar gouennañ gant an denion (frouezhigiñ, krouellañ, bezañ ganet).

NOTENN : Dibaot eo reveziadennoù an termen-mañ en un niver yezhoù en askont da vezañs daou dermen all, heñvelson ha heñvelskriv, arveret an eil en douarouriezh, egile el loenoniezh.

pédonculaires ou mésencéphaliques : **syndromes** ~ ◇ **pedoncular or mesencephalic syndromes** ◇ **azoniadoù troadem-pennel pe krennempennel** Teskad azoniadoù kiriek dezho tizhadur ar c'hrennempenn (pe troadenn an empenn), eleze al lodenn eus kef an empenn loet dreist ar pont ha dindan an hanterennnoù empenn; anaf un troad empenn a zevoud ul ledseizi dustuat ha war un dro, hervez sez an anaf, seizioù a 'n daoulagad, direizhoù a 'n tant, erzerc'hadoù ilpennel ha migevaot; diforc'hiñ a reer enta an azoniadoù *troadempennel arak* da heul un tizhad e parzh a-gof an troadempenn (*a. Weber, a. troadempennel Foville*); *a. ar steuñvenn du, azoniadoù ar golo* diwar un tizhad e parzh a-gein an troadempenn; *a. an turumelloù* (sl. *carre-four hypothalamique* : *syndrome du* ~, *Foville* : *syndromes de* —, *halluci-nose, locus niger* : *syndrome du* ~, *ophthalmoplégie nucléaire, tubercules quadrijumeaux* : *syndrome des* ~, *Weber* : *syndrome de* ~).

pédoncule ◇ **peduncle** ◇ **troad g., hordenn b., stirad g.** Funellad steuñvenn wenn o keneren daou barzh eus an empenn, sk. : *troad ar valzenn* (TA *pedunculus flocculi*, Gl. *pédoncule du flocculus*), *hordennoù derc'hvel-pluskenn* (TA *fasciculi thalamocorticales*, Gl. *pédoncules du thalamus*), *stirad ar c'hwesh* (TA *tractus olfactorius*, Gl. *pédoncule olfactif*).

pédoncules cérébraux, TA pedunculi cerebri ◇ **cerebral peduncles** ◇ **troadoù g. an empenn** Funelladoù tolzek steuñvenn wenn loet a-zaoudañ hag a-gemparzh e lodenn arak ar c'hrennempenn (sl. *pédonculaires pe mésencéphaliques* : *syndromes* ~).

pédonculotomie ◇ **pedunculotomy** ◇ **troadenbenañ** Skejañ surjaniel un troad a 'n empenn, amkanet da droc'hañ ar stirad pluskenn-livenn (TA *tractus pyramidalis*, Gl. *faisceau pyramidal*) hag ar stirad livenn-derc'hvel (TA *tractus spinothalamicus*, Gl. *faisceau spino-thalamicque*).

- pédophile** ◇ **1 p(a)edophilic, p(a)edophilic 2 p(a)edophile, p(a)edophilic** ◇ **1 maboriat** aa. **2 maboriad** g. -ed 1 Gant ar vaboriadezh. 2 Gouziviad ar vaboriadezh.
- pédophilie** ◇ **p(a)edophily** ◇ **maboriadezh** b. Tued gant oadourion pe krennarded kaezourek da serc'hiñ bugale pe krennarded rakkaezourek.
- pédopsychiatrie** ◇ **child psychiatry** ◇ **mabvredvezekniezh** b. Bredvezekniezh ar vugale.
- pédospasme, spasme pédal** ◇ **pedal spasm** ◇ **andag** g. **an troad, troadandag** g. Dargrezad an troad war astenn ha war enkamm e-kerz ar barrad tetaniezh : argeinek e vez kil an troad, argevek ar sol, ha war bleg ar bizied.
- pelade achromateuse** ◇ **achromic pelade** ◇ **peliad** g. **anlivegat** Furm eus ar peliad ma vez ar c'hroc'hen diliv hag isteñvek (sl. *alopécie*).
- pelade décalvante** ou **pelade décalvante universelle** ◇ **alopecia universalis** ◇ **diwaoutad moalaus** pe **peurvoalaus** Furm eus ar peliad o tedeñ herrek etrezek kouezh ar gwaout en e bezh hag ivez a-wechoù an holl vlev all (sl. *alopécie, calvitie*).
- pelade ophiastique, ophiase, ophiasis** ◇ **ophiasis** ◇ **peliad ofiasek** Furm eus ar peliad a stader gant ar vugale, o teraouiñ dre ur blakenn voal azerc'h war an askil; d'he heul e tinod plakennoù a-zremm o tisoc'h gant un diwaoutad eus bevenn draoù ar brigenn (sl. *alopécie, ophiase*).
- peladique** ◇ **peladic** ◇ **1 peliadek** aa. **2 peliadeg** g. -eion **3 peliadel** aa. 1 Gant ar peliad. 2 Gouziviad ar peliad. 3 a-zave d'ar peliad.
- pélagisme** ◇ **sea-sickness** ◇ **droug mor** Furm deadell o tizhout an dud dezouget dre vor, naouus dre an heugenn hag, e degouezhioù 'zo, an troleim (sl. *antinaupathique, cinépathie, naupathie, transports : mal des ~*).
- Pelger-Huet : anomalie nucléaire familiale de ~** ◇ **Pelger nuclear anomaly** ◇ **azoniad Pelger-Huet ezreolder ar c'hraoñelloù** Ezreolder hêrezhel kraoñelloù ar granulokit oadour, dezho un neuz tuzum hag arront, o tevoudañ kleizwariadur luniad Arneth hep azon all ebet.
- pélieuse hépatique** ◇ **peliosis of the liver** ◇ **pelioz** g. **an avu** Aneaz naouus, *ent klinikel* dre an derzhienn, ar boan gof ha strafuilhoù koazhadel, o chom a-wechoù diazon, *ent vevoniel* dre usvec'h an enzimoù avuel, *ent neuziadurel* dre neradur ha bolc'hadur ar c'horrwazhied spanaennek; furmoù 'zo, stadet e-kerz an haza, a vez kevredet gant ur bakteri Gram -, *Rochalimaea henselae*.
- Pelizaeus-Merzbacher : maladie de ~** ◇ **Pelizaeus-Merzbacher disease** ◇ **kleñved Pelizaeus-Merzbacher** Aneaz hêrezhel enkilek renket e-touez ar gwennvideñvoù, oc'h anadiñ adal mizioù kentañ an hoali hag o tedeñ gorrek, naouus dre un treuzseizi dasstrizhek argammedek gant direizhoù ilpennel, divig bred, strafuilhoù teñvel ha gwazhiedloc'hadel; ent neuziadurel e stader lijoennoù divielinaet ledek o c'hronnañ tachadoù bihan nervwiennoù gant o feurioù mielin bonan (sl. *leucodystrophie*).
- pellagr** ◇ **pellagra** ◇ **pellagr** g. Kleñved diwar un digeventel boued o tisoc'h gant negez an drenkenn nikotinek (vitamin PP pe enepPELLAGR), broreuziadek en taredoù ma vez ar boblañs diwar maiz dreist holl hep proteinoù loenel (amindrenkennoù, triptofan pergen); naouus eo ent klinikel dre un eritem o sezañ war ar parzhioù dizolo (gouzoug, fas, kil an daouarn), strafuilhoù koazhadel (teod ruz, aftoù, darc'hoal), direizhoù bred alies, troazhporfirinegezh, e troioù 'zo dedro d'ar falezha ha d'ar marv; pareañ a ra kerkent ma kemerer vitamin PP ha ma virer ur reol voued kempouez (sl. *antipellagreuse : vitamine ~*).
- Pellegrini-Stieda : maladie de ~** ◇ **Pellegrini-Stieda disease** ◇ **kleñved Pellegrini-Stieda** Askorneiadezh lez-skodenn stagell gengostezel a-skin ar glin e dianlen ur weadenn; anafoù heñvel a stader er skoaz, en ufern, war stagell ar padelleg.
- pellet** ◇ **pellet** ◇ **feran** g. -où Moustrad arzilerc'h (hormonoù, neuroleptier) a ensezer er gwiad kellaouek endan-groc'hen (sl. *comprimé, implantation*).
- pélose** ◇ **natural mud** ◇ **limouz** g. Fank naturel danvezet er yac'hadouriezh (sl. *boue thermale*).
- pelvigraphie** ◇ **pelvigraphy** ◇ **lestrluniñ** Studi al lestr dre araez ar skinluniñ.
- pelviologie** ◇ **pelycology** ◇ **lestrouriezh** b. Studi al lestr reol hag ezreol e diarsell an amiegouriezh.
- pelvimétrie** ◇ **pelvimetry** ◇ **lestrventerezh** g. Muzulierezh al lestr e diarsell an amiegouriezh, renet dre araez ar skinluniñ; evit muzuliañ an treuzkiz a-saezh e reer ouzhpenn gant ardivinkoù arbennik, ar *pelvimetroù* (Gl. *pelvimètres*) (sl. *bassin*).
- pelvipéritonite** ◇ **pelvipéritonitis** ◇ **lestrampeleñno** g. Tanijenn ampeleñn al lestr, peurliesañ a-geñver gant poreadur korzennoù ar grozh hag ar vierezioù.
- pelvis obsecta** ou **couvert** ◇ **pelvis obsecta** ◇ **lestr** g. **arzlidet** Lestr arstrizh e zigor krec'h e dianlen d'ur mellennlinkañ pe da rakwar an arskorn kroazell (sl. *spondylizème, spondylolisthésis*).
- pemphigoïde bulleuse** ◇ **bullous pemphigoid** ◇ **pemfigoid** g. **gloevennek** Kleñved unanhangael ar juntad derm-epiderm, kroc'henad dibaot o tarvezout peurliesañ goude an oad a c'hwegont vloaz, naouus dre un dispuilhad debronek gloevennoù bras endan-ezkroc'hen, sklaer al liñvenn enno, o sezañ war ar c'hef ha tachadoù plegañ an izili; steuziañ a ra ent emdarzh an anafoù a-benn un nebut bloavezhioù; anaez hiniennaet dre an hangaeouriezh : ar vezañs eus antikorfou amredat (IgG dreist holl) oc'h erwezhañ ouzh diazkennenn an epiderm ma furmont, gant ar glokaenn, gouzedoù hangaegeimplezhioù; ar re-mañ a adkaver e-barzh liñvenn ar gloevennoù hag a-wechoù er gwadveiz; gwellaet eo bet an erbedad, arvarek bepred, bennozh d'ar c'haengurañ lec'hiek (sl. *anticorps, auto-immune : maladie ~, complément, complexe immun, corticothérapie*).

pemphigoides ◇ **pemfigoids** ◇ **pemfigoidoù** Termen erdalat d'an holl kroc'henadoù gloevennek e-maez ar pemfiguz gwir : filboc'hennou a orin fizikel-kimiek, dispuilhadoù gloevennek liael, eritem liesneuz gloevennek, porfiriezhioù kroc'hen, ar pemfigoid gloevennek hag ivez tri anaez gloevennek a van dindan gevarguz o c'heñverioù gant ar pemfiguz gwir : pemfiguz lemm terzhiennek grevus Nodet, pemfiguz henek kuñv familhel, kleñved Dühring-Brocq (sl. *pemphigus*).

pemphigus ◇ **pemphigus** ◇ **pemfiguz g.** Termen arveret da gentañ evit arouezñ un anaf kroc'hen, ar c'hloevenn, ha goude, kement kroc'henad oc'h entalañ gloevennoù; hiziv e ranner ar c'hroc'henadoù gloevennek etre ar *pemfiguz gwir* hag ar *pemfigoidoù* (sl. *pemphigoides*, *pemphigus vrai*).

pemphigus aigu fébrile grave de Nodet ◇ **butchers' febrile pemphigus** ◇ **pemfiguz lemm terzhiennek grevus Nodet, pemfiguz ar gigerion** Anaez grevus e dianlen ur gloazad gant tud a vez dre vicher o tornata kelanoù loened; deraouiñ a ra dre un impetigo neban el lec'h enkorañ, heuliet trumm gant un dispuilhad gloevennoù war blakadoù eritematus, tra ma falla ar stad hollek ha ma talvez peurliesañ ar marv.

pemphigus des nouveaux-nés ◇ **pemphigus neonatorum** ◇ **pemfiguz an nevezc'hanidi** Kleñved darreuziat ha tredizhus, naous dre un dispuilhad gloevennoù gant pe hep terzhienn o tizhout mabaned vagol ha yac'h; dedreñ a ra a-fragadoù ha parañ.

pemphigus chronique bénin familial ◇ **benign chronic familial pemphigus** ◇ **pemfiguz henek kuñv familhel** Kroc'henad dibaot eus stroll ar pemfigoidoù, familhel, treuzkaset er mod trec'hek, o tarvezout gant an oadour yaouank, naous *ent clinique* dre blakadoù eritematus, warno gloevennoù, sezet war ar gouzoug, an divgazel, plegoù ar varlenn hag ar rannbarzhioù fraezhgandadel, dre vonanded ar stad hollek hag e guñved daoust d'an adfeilhoù a-hed ar bloavezhioù; *ent wiadoniell* dre anafoù akantoliz hebiat da vevadegzh ar c'helligoù.

pemphigus érythémateux ou séborrhéique ◇ **pemphigus erythematous, Senear-Usher disease** ◇ **pemfiguz eritematus pe soavredel** Seurtad pemfiguz gwir, naous dre an dinod, da gentañ, war an dremm, eus un eritem a rafé gouselout ul lupuz eritematus hag eus plakadoù damheñvel ouzh ar c'hroc'henfo soavredel, d'an eil war ar c'hef, eus un dispuilhad gloevennoù o fregañ herrek en ur lezel trouskennoù tev war o lerc'h; gorrek e vez an dedro ha feudek peurliesañ.

pemphigus foliacé ◇ **pemphigus foliaceus** ◇ **pemfiguz feilhennek** Seurtad pemfiguz gwir ma lez ar gloevennoù al lec'h gant plakadoù direoliek ruz-mouk, warno trouskennoù bihan lavnennek, o sezañ war barzh krec'h ar c'hein hag ar bruched; goude didorroù hirbad, e tedro ar c'hlañvour etrezek ar fallezh hag an andizh a-benn un nebeut bloavezhioù.

pemphigus oculaire, pemphigus isolé des muqueuses ◇ **ocular pemphigus** ◇ **pemfiguz lagadel, pemfiguz ar glaourgennoù** Kroc'henad gloevennek naous dre sez hanbarek an dispuilhañ, lec'hiet pell amzer er glaourgennoù : a 'l lagad dreist holl, a 'r genoù, a 'r c'hargadenn, a 'n treizher, a 'n organoù genel; dre e duadar da c'hleizennañ, e se da andiñvañ ar malvennoù ha da zemeraat ar c'hornsaeoù betek an dallentez; dre zinod goulerc'hat gloevennoù war ar fas, ar gouzoug ha parzh krec'h ar brus; anaez a ra aozerion 'zo anezhañ ur furm eus kleñved Dühring-Brocq (sl. *dermatite herpétiforme*).

pemphigus subaigu malin à bulles extensives ◇ **malignant pemphigus with confluent bullae** ◇ **pemfiguz goulemm yud gant gloevennoù daskantus** Seurtad pemfiguz boutin (sl. *pemphigus vulgaire*) naous dre astenned hag aloubusted ar gloevennoù o lezel war o lerc'h dre fregañ gorreadoù bras devliet, naouezennek, laurus kenan, dre zarallad grevus ar stad hollek ha dre un dedro feudek e korf un nebeut sizhunioù.

pemphigus végétant ◇ **pemphigus vegetans** ◇ **pemfiguz struzhennek** Seurtad pemfiguz boutin (sl. *pemphigus vulgaire*) naous dre fregadur kentrat ar gloevennoù, er genoù hag er plegoù dreist holl, hag, en o lec'h, dre an dispakadur eus bodennoù fouest o struzhennañ e rezh plakadoù bras torgennek ha dourasennus.

pemphigus vrai ◇ **pemphigus** ◇ **pemfiguz gwir** Stroll kroc'henadoù a orin unanhangaeel, boutin etrezo tizhadur an epiderm, an dinod eus gloevennoù, dic'henezhadur ar c'helligoù gant akantoliz hag an dedro emdarzh boas etrezek ar marv, oc'h erdalañ ar *pemfiguz boutin*, ar *p. goulemm yud gant gloevennoù daskantus*, ar *p. struzhennek*, ar *p. feilhennek*, har ar *p. eritematus* pe *soavredel*.

pemphigus vulgaire ou **malin** ◇ **pemphigus vulgaris, malignant pemphigus** ◇ **pemfiguz boutin pe yud** Seurtad pemfiguz gwir o tarvezout en oad etre, naous dre un dispuilhad gloevennoù liesment, dilaur, enno ul liñvenn melen-glein, dindano kroc'hen bonan, o c'holeiñ ar c'horf a-bezh, muiet er plegoù, astennet d'ar glaourgennoù (d'ar genoù pergen); gloevennoù o tisec'hañ hag o fregañ; diwar an deoù e vez tizhet don ar stad hollek (terzhienn uhel, strafuilhoù koazhadel, treutadur); kleñved o tedreñ etrezek ar marv dindan 6 da 12 miz.

pénalisation optique ◇ **optical embarrassment** ◇ **liveriñ optikel** Hentenn yac'hadel arveret ouzh ar bouc'hwel arc'hwelel pe ouzh al loakrevezh unlagadel, amkanet da vrellañ gweled ul lagad dre araez un dereizhañ optikel digevazas (sl. *amblyopie, assourdissement, correspon-dance rétinienne*, La-18 249-252).

pendaison ◇ **hanging** ◇ **krougañ, krougerezh g.** Enstrizhañ ar gouzoug dre ur skoulm stardet gant pouez ar c'horf, e ser un darwantad koulek, un argeziad emlazh, ur c'hosp lezennel, ur real brezel.

Pende : syndromes de ~ ◇ **azoniadoù Pende** 1 Furm fallezhel ar skorted kaenuslounezhel, naous dre gouezh argreskus ar pouez, ar skuizhoni, ur c'hroc'hen gourc'hennek, an iswask talmerel, ar gwadivvec'h glukoz ha kolesterol (sl. *insuffisance surrenale*). 2 sl. *hyperthyrie*². 3 sl. *matronisme*).

Pendred : syndrome de ~ ◇ **Pendred syndrome** ◇ **azoniad Pendred** Anaez tiegezhel, hêrezhel, treuzkaset damasur er mod enkilek aotzomek, naous dre gevreted ur bouzarder dec'havael, rouestlet a-wechoù gant ur muderezh, hag ur pennsac'h strewek pe nozelek, stadet peurliesañ en eil bugelvezh a-ser gant ur skoedisvorc'h argrenn.

pénétrance ◇ **penetrance** ◇ **gwerc'hennusted** b. Keal hiloniezh, feur an hiniennoù o piaouañ ur c'henenn lavaret erzerc'haet en doareenn geñverek; ur g. 100 % zo d'ar gen trec'hek, da skouer e tro korea Huntington; izeloc'h e vez ar g. pa vez enkilek ar gen, da skouer gant an hemokromatoz kentael (sl. *chorée héréditaire, dominant, expressivité, hémochromatose, prévalence, récessif*).

penicillinase ◇ **penicillinase** ◇ **penikillinaz** g. Enzim paret gant bakteri 'zo, o tourannañ ar penikillin (sl. *résistance bactérienne aux antibiotiques*).

pénicilline ◇ **penicillin** ◇ **penikillin** g. Bevastaler eus kerentiad ar β-laktamineier; ar *p. naturel*, danzeet gant ul louedenn, *Penicillium notatum*, o piaouañ ur wezhusted enepbakteri bras kenan, *in vitro* hag *in vivo*, ouzh lies hadenn : (gant ur werc'hegezh a vui da lei) ar strepokok, ar pneumokok, ar stafilokok, ar gonokok, ar meningokok, garvevion ar breinged goüs, bazhell an difteriezh, an treponem gwelw ha foue 'zo; ar *p. damgevanaoz*, harzusoc'h ouzh ar penikillinazoù (*p. M* : *metikillin*), pe ledanoc'h o skalfad, astennet d'an hadennoù Gram – (*p. A, aminopenikillineier* : *amoksikillin, ampikillin*); hiziv e vez rummet ar β-laktamineier etre *pen-nameier* (*penikillineier*), *penemeier*, *kefemeier* (*kefalo-sporineier*), *monolaktameier*, *oksapenameier* (heuderioù ar β-laktamazoù).

pénicillino-résistant ◇ **penicillinresistant** ◇ **penikillinharzus** aa. A-zivout ar garvevion a vez ar penikillin angwezhus outo.

Penicillium ◇ **Penicillium** ◇ **Penicillium** Genad foue edañvennek a zanvezer spesadoù anezho en oberiezh ar c'heuzioù (*P. roqueforti*) ha reoù all en ijinezh liael (sl. *pénicilline*); ur spesad hepken (*P. marneffeii*) zo kiriek da boreadoù kroc'hen ha skevent koulzataer, stadet ar re-mañ e Gevred Azia (sl. *opportuniste*).

pénis, verge TA penis ◇ **penis** ◇ **kalc'h** g. Organ gourel an dezioulañ, an derodiñ hag an embarañ, loet a-us ar gousc'h ha dirak juntad ar c'haezour, ouzh e ober ar c'han troazh, ar c'horfoù sonnidik (keviaouek ha spoueek) hag ar vezenn, parzh pellek anezhañ, en he c'hern gwask diavaez ar c'han troazh o reiñ hent d'an troazh ha d'ar sper; en dro d'ar c'halc'h ur c'holoenn groc'hen heloc'h, ar feur (Gl. *fourreau*), a anver beskenn ar rann anezhi o c'holeiñ ar vezenn (sl. *copulation, corps caverneux, corps spongieux, éjaculation, érectile, gland, méat, miction, prépuce, scrotum, symphyse pubienne, urètre*).

pénitis ◇ **penitis** ◇ **kalc'hfo** g. Tanijenn ar c'halc'h en e bezh, o tisoc'h gant al linañ hag a-wechoù gant ar breinged.

pentalogie ◇ **pentalogy** ◇ **pempadezh** b. Kevreted pevaradezh Fallot gant ur c'hehendad etre-kofigoù pe etre-kentezoù (sl. *communication interauriculaire, communication interventriculaire, tétralogie pe tétrade de Fallot*).

NOTENN : Ent klasel e reer kel eus *pentalogie de Fallot* daoust ma ne voe ket deskrivet an holl gammeuziadoù-mañ gant É-L. Arthur Fallot.

pentaploïdie ◇ **pentaploidy** ◇ **pentaploïdiezh** b. Gouskoevad kromozomel dibaot, anezhañ bezañs 5 n kromozom e-lec'h 2 n ebarzh kelligoù ar *soma* (sl. *aberration chromosomique, diploïdie*).

pentosurie ◇ **pentosuria** ◇ **troazhpentozegezh** b. Ezreolder kennevidel kuñv a stader gant Yuzevion amerikan 'zo, anezhañ dioulerezh ur pentoz (sukrenn 5 atom karbon), an L-ksiluloz.

Pepper : **syndrome de ~** ◇ **Pepper syndrome** ◇ **azoniad Pepper** Azoniad diwar evodadur en avu ar maban eus dasseziou ur simpatom rizhellal a 'r vezonuslouezhenn, naouus dre un usvent keurek a 'n avu o skrammañ ar yoc'henn gentael hag an dedro etrezek ar fallezh hag ar marv dindan 2 pe 3 miz.

pepsine ◇ **pepsin** ◇ **pepsin** g. Enzim proteinloezus hezileizh bezant e sug ar c'hreuz, araezus da dreiñ proteinoù ar boued e peptonoù, eleze e korfoù hezileizh ha skignus, dre se aes da sugañ ha da vevelaat; furmet e vez ar *p.* dre vliavaerezh ar *pepsinogen* borc'het gant glaourgenn ar stomok.

peptide ◇ **peptide** ◇ **peptid** g. Protein o tisoc'h eus kengediadur lies amindrenkenn; hervez an niver e teskriver *dipeptidoù, tripeptidoù, ... dekaeptidoù*, h.a. (sl. *polypeptide*).

peptide cérébral natriurétique, BNP ◇ **brain natriuretic peptide, BNP** ◇ **peptid natriomdroasheiat empennel, BNP** Peptid bet dizoloet e 1988 en empenn (alese e anvad) ar moc'h ha borc'het dreist holl gant kelligoù kaher ar c'hofigoù; dindan imbouc'h emañ an dezventañ anezhañ e-keñver deznaouiñ hag erdebiñ ar skorted kalon : arouez houmañ e ve ur gwadvec'h BNP dreist da 400 pg/mL, tra ma ve reol ar gwadvec'hioù dindan 100 pg/mL (sl. *natriurétique*).

peptides vasoactifs et natriurétiques, vasopeptides ◇ **natriuretic and vasoactive peptides** ◇ **peptidoù gwazhiedwezhus ha natriomdroasheiat** (en anvad stroll-mañ e ranker intent *gwazhiedwezhus* evel *gwazhiedfrankaus*) tri rizeh peptidoù : ANP, ANF (sl. *facteur natriurétique auriculaire pe atrial*); BNP (sl. *peptide cérébral natriurétique*); CNP, *peptid natriomdroasheiat a rizeh C*, bet dizoloet en empenn ar moc'h, hogen enaozet ivez gant an endotelienn; e kemm ouzh ar rizehoù A ha B, ne ve ket hormone) e wered, met lec'hel, kefinenborc'hat; ec'haozet e vez an tri rizeh gant ur vazopeptidaz, an *endopeptidaz neptu*, a gorvoer an heudiñ anezhañ evit prederiañ an uswask talmeriñ hag ar skorted kalon (sl. *urodilatine*).

peptique ◇ **peptic** ◇ **peptek** aa. A-zave d'ar c'hoazh-hañ (sl. *ulcère peptique*).

Peptococcus ◇ **Peptococcus** ◇ **Peptococcus** Genad bakteri eus kerentiad ar *Peptococcaceae*, skourrad ar *Firmicutes*, anaerat, ankleñvedus evit an den.

peptogène ◇ **peptogenic** ◇ **pepsineia** aa. A-zivout an danvezennoù evret o vuiaat paratur ar pepsin er sug kreuz.

peptone ◇ **peptone** ◇ **pepton** g. Meskad peptidoù o tisoc'h eus ec'haozadur an danvezennoù proteinek, danvezet evel metoù tiñvañ er vakterouriezh (sl. *culture : milieu de ~*).

Peptostreptococcus ◇ **Peptostreptococcus** ◇ **Peptostreptococcus** Genad bakteri aerat ret eus kerentiad ar *Streptococcaeae*, oc'h arvevata ar pervez; goubaret eo bet diouzh anafoù breingedel 'zo.

per os, par voie buccale, par voie orale, oral ◇ **per os, by mouth, orally** ◇ **per os, dre euvriñ, dre ar genoù, genaouel** Geriennoù oc'h arouezñ ar c'hemer ul lia dre he lonkañ.

percussion ◇ **percussion** ◇ **1 kiziata 2 tosata** 1 Mod imbourc'h klinikel o c'hoarvezout a zec'han steniou 'zo dre skeiñ gant ur biz (*kiziata kentizhek*) war ul lec'h savelet eus ar c'horf evit anaout stad ar parzhioù danloet; peurliesañ e toder ur biz eus an eil dorn etre amwiskadoù ar gouziviad hag ar biz o skeiñ (*kiziata handizhek*); *kiziata diac'hinek* (Gl. *percussion paradoxale*) a reer eus hekleusted ar bruched agevret gant ronkoù stank, anadenn a stader e gouliñv lemm ar skevent (sl. *œdème pulmonaire*). 2 Doare merata, anezhañ ul lerc'hiad tosoù gorre pe zon graet gant ar bizied (*biziata*), gant ribl ahelmo an daouarn pe gant ar meilh dorn, arloet ouzh ar parzh korf a venner leuñviñ; gwerediñ a ra war ar c'hroc'hen pa vez an embreg renet skañv, war ar c'higennoù pa vez renet don (sl. La-18 233).

percutané, transcutané ◇ **percutaneous, transcutaneous, transdermal, transdermic** ◇ **treuz-kroc'hen, treuzkroc'h-enel aa., tregroc'henel aa.** O c'hoarvezout a-dreuz ar c'hroc'hen (sl. *Vollmer : test de ~*).

percutiréaction, test de Moro ◇ **percutaneous reaction** ◇ **erwezh g. treuzkroc'henel, treuzkroc'henerwezh g., proud g. Moro** Erwezh foel o c'hoarvezout en daou zevezh kentañ goude dodiñ un dakenn duberkulin devec'hiet ent yen ha formolet war an epiderm spuret dre an eter; proud kizidikoc'h hag aesoc'h da embreg eget an erwezh kroc'henel (sl. *cuti-réaction*).

(-)*perfor-*

• *capillaires dont la paroi comporte des perforations arrondies* korrwazhied a zo boulc'henoù krenn en o speur • *imperforation* andigor, anvoll, peuravoll • *imperforation de l'artère pulmonaire* andigor eus kef ar skevent ◇ *imperforation de l'hymen* antreorc'h al lienn gourzh • *imperforation du canal génital chez la femme* andigor kanol c'hanadel ar plac'h • *mal perforant* droug treloezus • *péritonite par perforation* ampeleñno diwar dreloezañ • *péritonite et, dans le quart des cas, perforations* ampeleñno hag, er palevarzh eus an degouezhioù, treloezadoù • *pneumopéritoine consécutif à une perforation intestinale* toraezhad diwar dreloezadur ar pervez • *une perforation de la cornée* un treloezad er gornsaes.

performance ventriculaire ◇ **ventricular performance** ◇ **digonusted b. kofigel** Barr azasaat ar c'hofig ouzh ezhommoù amred ar gwad; emañ e dalc'h an argrezusted, an talm, ar rakkarg hag ar goudekarg (sl. *postcharge ventricu-laire, précharge ventriculaire*).

perfuseur ◇ **infusor** ◇ **trefenner g. -ioù** Trevnad araezus d'an trefennañ.

perfusion ◇ **infusion** ◇ **trefennañ, trefennad g.** Ensinklañ engwazhiennel gorrek ha hirbad un dileizhad ken- pe usgrennek, sallet pe sukret, liaoù ennañ pe get (sl. *dialyse intestinale, transfusion*).

périadénite ◇ **perilymphadenitis** ◇ **trowerblennfo g.** Tanijenn an amgelc'hiad kenglenel tro-werblenn, rouestlad a 'r gwerblennfo.

périadénoïdite ◇ **peradenoiditis** ◇ **trostruzhennfo g.** Morfer ar fric'hargadenn er poent ensteudañ ar struzhennoù gwerblennel.

périappendicite ◇ **periappendicitis** ◇ **trozivilhennfo g.** Ampeleñno lec'hiet en dro d'an divilhenn breñvek.

périartérite ◇ **periarthritis** ◇ **ezsaefo g.** Tanijenn sae diavaez an talmerennoù; kevredet e vez alies gant tanijenn ar grennsae hag an ensae, o tisoc'h neuze en un talmerennfo.

périartérite ou panartérite noueuse, maladie de Kussmaul-Maier ◇ **polyarteritis or panarteritis or periarthritis nodosa** ◇ **trodalmerennfo g. pe liestalmerennfo g. pe holldalmerennfo g. ulmennek** Aneaz dibaot, naouus, *ent clinique* dre un azoniadur liesneuz, ouzh e ober teir elfenn sourus : un asikted vras, un derzihienn direoliek ha darallad ar stad hollek, ivez arouezioù un nervennfo liesel (laurioù kriz strewek, isteñv ar c'higennoù ha steuz an damougou), erzerc'hadoù kroc'henel (dispuilhadoù eritematus pe purpurek, ozvennoù kalet ha heloc'h), tizhadoù lounezhel, analadel, koazhadel, kalongwazhiedel, lagadel, ha hogos bepred an dedro etrezek ar marv herrek pe herrekoc'h (etre sizhunvezhioù ha bloavezhioù); *ent neuziadurel*, dre anafoù talmerennfo hanrannel gant granulom trowazhiedel e rezh nozelennnoù dasparzhed war an talmerennoù bas pe don, bihan-pe grenngavnezh, rouestlet alies gant anforzhioù ha darvolloù; *ent nozografek*, e renker an *l. u.* etouez kleñvedoù ar c'hollagen ha, nevesoc'h, e reer anezhañ ur c'hleñved a 'n hangaegemplezhioù (sl. *angéite allergique, collagène : maladie du ~, complexe immun, livédo, multinévrite*).

périarthrite ◇ **periarthritis** ◇ **troarzfio g.** Remm ec'hazel o tizhout teskad ar gwiaoù stirek en dro d'ur c'henvell; an div furn paotañ eo *l. t. ar skoaz* (Gl. *p. de l'épaule*) (pe *t. plancken-paler*, Gl. *p. scapulo-humérale*), a c'hell bezañ rik, e dianlen ur stirennfo eus kouc'h ar c'hweleriou (sl. *coiffe des rotateurs*) pe eus ur yalc'hfo kefin, kevredet alies gant un artroz a 'r gouzoug pe un nervost skoazbrec'hel; peurliesañ avat e tizh an danijenn holl dalennnoù ar c'henvell, ken e reer *arzfio ar skoaz eus t. ar skoaz* boutin ha *skoaz sonn* eus an "troarzfio rik" (sl. *épaule gelée*); 2) *t. al lez* (Gl. *p. de la hanche*), stirennfo pe stirennyalc'hfo trovaleg gant pe hep razekadurioù, oc'h erzerc'hañ dre ul laur us-trovaleg o saezhenniñ e lodenn diavaez ar vorzhed.

péricarde, TA pericardium ◇ **pericardium** ◇ **amgalonenn b.** Sac'h levrstirek o c'holeiñ ar galon, ouzh e ober an *a. stirek* (Gl. *p. fibreux*), en dro d'an *a. levrus* (Gl. *p. séreux*), o c'hoarvezout he unan eus ur *feilhenn speurel* (Gl. *feuillelet pariétal*) hag ur *feilhenn flugezel* (Gl. *feuillelet viscéral*).

péricard(i)ectomie, péricardiolyse, cardiolyse ◇ **pericardectomy** ◇ **ezvenañ amgalonenn, amgalonnenzevenañ, kalon-ezgleñañ** E tro un amgalonenn dre henek amwaskus, distoagennañ ar galon e sell d'he divac'hañ diouzh ar grogen stirek pe razek o skoilhañ ouzh he arc'hwelerezh, eleze dazbidañ an amgalonenn peurgetket e par an nant kuruner, ar c'hofigoù ha gwaskoù ar gwazhied bras.

péricard(i)ocentèse ◇ **pericardiocentesis** ◇ **ezwanañ amgalonenn, amgalonnenzewanañ** Diraez ur fennad bezant e kavenn an amgalonenn dre sankañ un nadoz en argreuzenn pe er 5t tachad etre-kostoù kleiz, diouzh an dro gant harp ar c'halonstenerluniñ pe, diogeloc'h, e ser un diraez surjaniel.

péricard(i)otomie ◇ **pericardiotomy** ◇ **enbenañ amgalonenn, amgalonnenbenañ** Digeriñ surjaniel an amgalonenn evit karzhañ un hogennad liñvenn.

péricardique ◇ **pericardial** ◇ **amgalonnenel** aa. A-zave d'an amgalonenn.

péricardite ◇ **pericarditis** ◇ **amgalonnenno** g. Tanijenn an amgalonenn, sec'h pe gant ur fennad (levruzenn, lin, gwad).

péricardite aiguë bénigne ou **épidémique** ou **fugace** ou **aiguë non spécifique bénigne** ◇ **idiopathic acute pericarditis** ◇ **amgalonnenno lemm kuñv** pe **hennadek kuñv** Amgalonnenno o tarvezout gant an oadourion yaouank, naouus dre un deroù lemm, laurus kenan, terzhiennek hag o tedeiñ etrezek ar pare, a-wechoù oc'h adfeilhañ; e kevarguz e chom un orin viruzel.

péricardite constrictive ◇ **constrictive pericarditis** ◇ **amgalonnenno amwaskus** Furm amgalonnenno henek, naouus dre devadur sac'h an amgalonenn (*troc'hamgalonnenno*, Gl. *pachypéricardite*), a ya d'ober ur grogen stirek pe karnek, razekaet a-wechoù, anenn, o vac'hañ ar galon, o tiaezañ he loc'hadoù hag o tec'han ur skorted kalon, gant uswask gwazhiennel, torliñv muiek, usvent an avu (gaougirroz amgalonnenien, sl. *pseudocirrhose péricardique*), dulaz, dardennad gwazhiennoù ar c'herc'henn, gouliñv an divesker; arbenn pennañ an *a.a.*, gwechall an dorzhellegezh, zo hiziv ar c'hankroù; ar prederiadur nemetañ eo ar c'halonezgleñañ (sl. *péricardec-tomie, symphyse cardiaque*).

péricardoplastie ◇ **pericardoplasty** ◇ **atelviñ amgalonenn, amgalonnenatelviñ** Azneuziañ surjaniel an amgalonenn goude un dazbidañ darnel.

péricardoscopie ◇ **pericardoscopy** ◇ **amgalonnenngweliñ** Kalvezder luc'hengweliñ arveret evit an imbourc'h treoberatael eus an amgalonenn.

péricholangiolite ◇ **pericholangiolitis** ◇ **perikolangiolit** g., **troheringfo** g. Tanijenn ar gwiad entremezel en dro da forzhioù Hering.

péricholécystite ◇ **pericholecystitis** ◇ **perikolekistit** g., **trovestlforzhfo** g. Tanijenn ar gwiad kellaouek en dro d'ar gellenn vestl.

périchondrite ◇ **perichondritis** ◇ **amvigornennfo** g. Tanijenn, lineiat alies, an amvigornenn, kennenn stirek en dro d'ar migorn, anaf a stader peurliesañ e par ar c'harloc'henn.

périchondrome ◇ **perichondroma** ◇ **perikondrom** g. Kondrom evodet diouzh an amaskornenn hag a-wechoù diouzh kaennenn an askorn, sezet dreist holl war eskern bras an izili, ar planken skoaz, al lestr (o vezañ neuze a-wechoù orin ur mieskor).

péricolite ◇ **pericolitis** ◇ **trogolonfo** g. Ampelennfo lec'hiet en dro d'ar c'holon, peurliesañ e dianlen ur c'holonfo hanannel.

périconception ◇ **trouennañ** Teskad an anadennoù bevedel ha kleñvedel angorzhet gant ar gouennañ, an hilastaliñ koulz ha gant ar c'haonac'hded (sl. La-18 327-328).

périconceptionnel ◇ **trouennadel** aa. A-zave d'an trouennañ.

péricoronarite ◇ **pericoronitis** ◇ **trogurunennfo** g. Poreadur ar gwiadoù en dro da gurunenn un dant kaelet e-barzh ar c'haved (sac'h trogurunenn).

péricytes ◇ **pericytes** ◇ **perikit** s. Kelligoù histiokitel oc'h ober sae diavaez (*peritelienn*, Gl. *périthélium*) korrwazhied 'zo.

pérididymite ◇ **perididymitis** ◇ **amglidennfo** Tanijenn an amglidenn pe *gwennsae* ar *glidenn* (TA *tunica albuginea testis*, Gl. *albuginée testiculaire*).

péridiverticulite ◇ **peridiverticulitis** ◇ **trovogodfo** g. Seurtad trosigmafo (sl. *périsigmoïdite*) e dianlen an danijenn e bogodoù ar c'holon.

périduodénite ◇ **periduodenitis** ◇ **trozaouzegennfo** g. Ampelennfo henek lec'hiet en dro d'an daouzegenn, en orin naskoù ha glenelloù gant an organoù kefin.

péridural ◇ **peridural** ◇ **wardevel** aa. Loet en dro d'ar bilhonenn dev (sl. *anesthésie épидurale, épидurite, épидuro-graphie, espace épидural, dure-mère*).

périencephalite ◇ **periencephalitis** ◇ **troempennfo** g. Tanijenn ar bluskenn louet kevret gant ur pilhonfo (sl. *paralysie générale progressive, périencephalite chronique diffuse*).

périfolliculite pileaire ou **pilosébacée** ◇ **périfolliculitis** ◇ **trovolc'hennfo** g. **blevel** pe **blevsoavel** Tanijenn ar c'hroc'henn en dro d'ar bolc'hennoù blevel, a-wechoù unel, a-wechoù a-vlokad.

périfolliculite urétrale ◇ **urethral folliculitis** ◇ **trovolc'hennfo ar c'han troazh** Tanijenn ar gwiad kellaouek en dro d'ar c'han troazh, o tont evel rouestlad d'ar vlenorragezh, alies en orin ur pugnez tro-gantroazh.

périgastrite ◇ **perigastritis** ◇ **trogreuzfo** g. Ampelennfo en dro d'ar stomok.

- périhépatite** ◇ **perihépatitis** ◇ **stirsaeo** g. Tanijenn sae stirek an avu (pe *stirsae an avu*, TA *tunca fibrosa (hepar)*).
- périkératique** : **cercle** ~ ◇ **perikeratic ring** ◇ **gwalenn dro-gorsae** Kelc'hiad gwazhied a stader er c'hornsaefoioù en dro d'ar gorsae.
- périkystectomie** ◇ ◇ **amgistennezevenañ** Dazbidañ ur c'hist hag ar golo anezhañ (*amgistem*, Gl. *périkyste*).
- périkystite** ◇ **pericystic inflammation** ◇ **amgistennfo** g. Tanijenn ar gennenn genglenel, gwazhiedet puilh peurliesañ, o c'holeiñ ur c'hist; an *a. poreel* eo a zec'han al linadur eus kistoù hidatek an avu.
- périmymphe**, TA **perilymphe** ◇ **amzourenn** b., **perilimf** g. Liñvenn bezant e tachad perilimfel (Gl. *espace périlymphatique*) ar skouarn diabarzh : disrannañ a ra ar milendalloù askornek ha lienennek ha n'emañ ket kehent gant an endourenn (pe endolimf) (sl. *endolymphé*).
- périmaxillite** ◇ **perimaxillitis** ◇ **amgarvanennfo** g. Amaskornennfo ar garvan (sl. *maxillaire, maxillite*).
- périméningite aiguë spinale** ◇ **spinal meningitis** ◇ **trobilhonfo a-livenn** Anaez dibaot, naouus *ent neuziadurel* dre danijenn ar gwiad behinkellaouek en dro da bilhonenn dev al livenn, *ent klinikel* dre laurioù kriz, berius, da c'houde dre ur seizi gwak gant aneraez eus lodenn draoñ ar c'horf; dedreiñ a ra ar seizi dre emastenn da gigennoù ar brusk, betek ar marv diwar angwent.
- périmètre** ◇ **perimeter** ◇ **perimetr** g. -où Ardivink amkanet da imboure'hiñ astenned ar gwelvaez (sl. *champ visuel*), lies rizh anezhañ : *p. Landoolt*, *p. Magitot*, *p. Goldmann*; hemañ diwezhañ o c'hoarvezout eus ur gouc'hell ma steud ar gouziviad diouzh ar c'hreiz anezhi tra ma loc'h poentoù luc'h war argev ar gouc'hell.
- périmétrie** ◇ **perimetry** ◇ **perimetriñ**, **perimetrezh** g. Imboure'hiñ astenned ar gwelvaez dre araez ar perimetr (sl. *périmètre*).
- périmérite** ◇ **perimetritis** ◇ **trogrozhfo** g. Lestrampelenno e dianlen poreadur adparzhioù ar grozh (sl. *pévipéritonite*).
- périmysium** ◇ **perimysium** ◇ **amgaherenn** b., **perimizio** g. Feur genglenel o c'hronañ pep hordenn eus ur gigenn rizennek (sl. *endomysium, épimysium, muscle*).
- périnatale** : **période** ~ ◇ **perinatal period** ◇ **prantad** g. **troc'hanedel** Prantad etre 154t deiz ar vec'hiegi hag ar 7t deiz goude ar c'hanedigezh (sl. *âge gestationnel, néonatale : période* ~).
- périnatalité** ◇ ◇ **troc'hanedelezh** b. Aoziou ar genel hag an arouelioù rekizet a-raok, e-doug ha da heul ar vrazedez : dizarbenn ar c'haonac'hded, kuzukiañ hiloniel, hamouelañ an dougerez e-doug he bec'hiegi hag en he gwilioud, an nevezc'haned, h.a.
- périnata/ologie** ◇ **perinatology** ◇ **troc'hanedouriezh** b. Studi ar c'hleñvedoù a c'hell tizhout ar bugel er prantadoù diouzhtu a-raok ha goude e c'hanedigezh.
- périnéal** ◇ **perineal** ◇ **garbedenn**, **a-c'harbedenn**, **garbedennel** aa. A-zave d'ar c'harbedenn.
- périnée**, TA **perineum** ◇ **perineum** ◇ **garbedenn** b. Teskad ar parzhioù meizh e stumm ul lankell loet dindan kelc'hspereunn al lestr, bevennet a-raok gant jundat ar c'haezour, a-dreñv gant an askorn belost, a-gostez gant barroù traoñ an eskern kaezour, ha treuzet a-dreñv gant ar fraezh, a-raok gant ar c'han troazh hag ar gouin er venev, gant ar c'han troazh, an nervenn sperius hag ar gwazhied sperius diabarzh durc'haet a ziadreñv da ziaraok er gourev.
- périnée** : **déchirures du** ~ ◇ **perineal wounds** ◇ **rogadoù ar c'harbedenn** Fregadoù emdarzh direoliek eus gwiadoù ar c'harbedenn etre freilh adreñv ar muzelloù hag ar fraezh o tarvezout da vare ezvoutad ar grouell, a-gevaraez a-wechoù da ezreolderioù diagent (poreadoù, gouliñv, anvoll); alies, evit o hepkoriñ, ez embregere ur c'hourzhenbenañ erguradel (sl. *épisiotomie*).
- périnéocèle** ◇ **perineocele** ◇ **garbedennogad** g. Aveleñ a-c'harbedenn.
- périnéoplastie** ◇ **perineoplasty** ◇ **garbedennatelviñ** Dazluniañ ar c'harbedenn goude ar rogadoù pe an izadoù (sl. *périnée : déchirures du* ~, *prolapsus*).
- périnéorrhaphie** ◇ **perineorrhaphy** ◇ **garbedenn dlita** Krafaelañ div vriell ur c'harbedenn roget da geñver ur gwilioud, goude o dazbevaat evit ur rogad a-gozh, dazneuziañ an dalenn gaherfaskiennel mar bez ret ha dlita ar c'higennoù uhelaer (sl. *myorrhaphie*).
- périnéotomie** ◇ **perineotomy** ◇ **garbedennenbenañ** Flanchañ ar c'harbedenn.
- périnéphrite**, **paranéphrite** ◇ **perinephritis** ◇ **trolounezhfo** g. Tanijenn amgelc'hiad behinkellaouek al lounezh; dedreiñ a ra etrezek ar skleroz (*t. sklerozel*), an usvent behinel (*t. fibrolipomatus*) pe al linañ (*morfer tro-lounezh*).
- périnèvre** ◇ **perineurium** ◇ **ec'hordenn** b., **perineurion** g. Lienenn voan en dro d'un hordenn nerval trobarzh (sl. *endonèvre, épinèvre, gaine, Schwann : gaine de* ~).
- 1 période 2 demi-vie**, **période** ◇ **1 period 2 half-life** ◇ **1 trovezh** b. **2 hanterhoali** g. 1 Padvezh arstalek etre erzerc'hadennoù unrezh kenheuilh un anadenn, sk. : trovezh 1 s lamm bizig un eurier kouarz. 2 Padvezh ret d'ur braster war zigresk argemmmac'hel evit bezañ direet d'an hanter eus e werzhad kentañ; *h. skinoberiek* (Gl. *d.-v. radioactive*), padvezh ret d'ur skinnukleid evit koll an hanter eus e skinoberiegezh; *h. bevoniel* (Gl. *d.-v. biologique*), padvezh ret d'an hanter eus kementad un danvezenn ebarzh et en ur reizhiad vevoniel evit steuziañ; *h. gwerc'hek* (Gl. *d.-v. effective*), padvezh ret d'ar c'hementad eus un izotop skinoberiek bezant en ur reizhiad vevoniel evit bezañ direet d'an hanter dre berzh sammad an digevanañ skinoberiek hag an ezvevennañ bevoniel desellet ent amesadek evel argemmmac'hel .

NOTENN : Dre reolenn ez arverer al lostger *-el* da sevel an adanvioù o verkañ ar sell diouzh an erdal (sl. La-05 67 hh.). An damant d'ar skañvder eo a reas disteurel *hanterhoali skinoberiegezhel* ha tremen gant *hanterhoali skinoberiek*.

périodique ◇ **periodic** ◇ **1 trovezhiiek aa. 2 arreadek aa., mareadek aa.** 1 A-zivout un anadenn o tarvezout e rezh erzerc'hadennoù unrezh kenheuilh, etrezo ur padvezh arstalek. 2 O toareañ un darvoud o tistreiñ ingal.

NOTENN : Ent strizh e tere Gl. *périodique*, Sz. *periodic*, Br. *trovezhiiek* ouzh an anadennoù alvezel. Astennet emañ an arver anezho d'an adadennoù bevedel ha bredel arreata, war-bouez ur prizadur arnesadek eus o doare erzerc'hañ. Br. *mareadek* a dalvez dreist holl evit devoùoù ar gedvuhez.

périodique : **maladie** ~, **fièvre méditerranéenne familiale**, **MEFV** ◇ **familial Mediterranean fever**, **periodic fever or disease**, **MEFV** ◇ **kleñved arreat**, **terzhienn vorkreizat familhel**, **MEFV** Anaez hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, lec'hiet ar c'henenn giriek war vrec'h verr ar c'hromozom 16, o tizhout ar re yaouank ha ent hanbarek Yuzevion ar Magreb hag an Armeniz, naouus dre an arreadur, gant entremeziou kemmus, e-doug bloavezhioù, eus barradoù feuls, un nebeut gwezhioù pad, gant azonou ken arzel, ken kofel (ganto doare an divilhenno pe an antreizh pervez lemm), ken kofbruskel, ken gwesterel gant felc'h-usvent, ken olneutrofilel, purpurel, halvusvorc'hel, h.a.

périésophagite ◇ **perioesophagitis** ◇ **trodreizherfo** g. Tanijenn ar gwriad kellaouek en dro d'an treizher.

périostal, **périostéal**, **périostique** ◇ **periosteal** ◇ **amaskornenn**, **amaskornennel** aa. A-zave d'an amaskornenn.

périoste, TA **periosteum** ◇ **periosteum** ◇ **amaskornenn** b. Kennenn stirek o c'holeiñ an askorn, lakaet er-maez an talbennoù kenvelañ, en he roll magañ, kreskiñ ha, diouzh ret, ratreañ an askorn.

périostite, **périostéite** ◇ **periosteitis** ◇ **amaskornennfo** g. Anvad rumm tanijennoù lemm an amaskornenn, kevret peurliesañ gant an askornfo.

périostose, **périostéose** ◇ **periostosis** ◇ **periozost** g. Anaf anfoel an amaskornenn, en ervez da dreiñ en ec'haskornenn.

péripachyméningite purulente aiguë ◇ **acute purulent peripachymeningitis** ◇ **trodevbilhonfo** g. **linek lemm** Tanijenn lineiat lemm eus talbenn diavaez ar bilhonenn dev a-livenn hag ar gwriad kenglenel etrezi hag an askorn, gant an diflosk ledek pe ledekoc'h anezhi, o tarvezout peurliesañ e dianlen un anaf lec'hiek eus ar mellkein.

péripartum ◇ **peripartum** ◇ **troeskorvezh** g. Prantad o c'harvezout eus mizvezh diwezhañ ar vec'hiegi gant ar mizvezhioù kentañ goude ar gwilioud (sl. *Meadows* : *syndrome de* ~).

péripérique : **syndrome** ~ ◇ ◇ **azoniad trobarzh** Teskad an azonou diwar dizhadur an neuron trobarzh e par ar c'horn arak, ar gwriziennoù a-dor pe a-gein, ar gangrenn pe an nervern.

péripnébite ◇ **periphlebitis** ◇ **trowazhiennfo** g. Tanijenn ar gwriad kenglenel en dro d'uar wazhienn, deanvadur arloet e gaou alies ouzh ar gwazhiennfoioù gorre pe ouzh an teuc'helloioù.

péripolésis ◇ **peripolésis** ◇ **peripolez** g., **trogenk** g. Trehentad ur gellig, ul limfokitenn pergen, o vont e diastok ur gellig all hag o tilec'hiañ war he gorre hep enteñ (sl. *diapédèse*, *empéripolése*).

périprouctite septique diffuse, **cellulite pelvienne** ◇ **gangrenous periproctitis** ◇ **troyoulc'hfo** g. **lestek a-strew**, **troyoulc'hfo breingedek**, **kenglenfo al lestr** Tanijenn strewek en dro d'ar youlc'h, eilvedel peurliesañ d'ur gouli er fraezh pe er youlc'h, o wazhañ dreist holl an diabeteion hag an alkooleion.

périproustatite ◇ **periproustatitis** ◇ **troaksavennfo** g. Tanijenn ar gwriad kellaouek en dro d'ar raksavenn, eilvedel peurliesañ d'ur raksavennfo, dibaotoc'h d'an danijenn en un organ kefin (c'hwezhiagell, youlc'h, kellenn sper).

périsigmoïdite ◇ **perisigmoïditis** ◇ **trosigmafo** g. Annon pore e kefin ar c'holon sigma e dianlen ar poreadur pe an treloezadur anezhañ.

périsplénite ◇ **perisplenitis** ◇ **trofelc'hfo** g. Tanijenn lec'hiek an ampeleñ en dro d'ar felc'h.

périsoploïde ◇ ◇ **perisoploïdel** aa. (termen hiloniezh savet diwar batrom *haploïdel*, *diploïdel*, h.a.) a-zivout ar c'helligoù poliploïdel e piaou d'un niver ampar a *n* kromozom (*3n*, *5n*, *7n*...) (sl. *diploïde*, *haploïde*, *polyploïde*).

péristaltique ◇ **peristaltic** ◇ **1 amdonnek aa. 2 amdonnell** aa. 1 Gant an amdonnegezh, anezhi heuliad argrezadoù o treledañ eus argrec'h da draoñ e speur un organ kleuz, bezant e parzhioù eus ar ganol vezhur hag eus flugez 'zo evel ar san droazh. 2 A-zave d'an amdonnegezh.

péristaltisme ◇ **peristaltism** ◇ **amdonnegezh** b. Loc'hadur amdonnek ar c'higennoù levn bezant e speur an organoù kleuz, e roll erluskañ an endalc'had anezho; gant ar ganol vezhur, e teraou ar wagenn amdonnek en treizher kerker ha lonket ar boued hag e tehent hemañ betek ar stomok; eno, ouzhpenn erluskañ ar c'hir boued, en en bres gant sug an organ; en tu all d'an daou arc'hwel-se, pa zegouezh ar c'hir er pervez ez eus da lakaat war gont an amdonnegezh un trede gwered, a zo aesaat ar sugañ, hag ur pevare, oulgarzhañ.

périsynovite ◇ **perisynovitis** ◇ **troirgenennfo** g. Gor pe mferer er gwiskad kenglenel o c'hronnañ an irgenn, peurliesañ da heul un irgenennfo linus.

péριθélium ◇ **perithelium** ◇ **peritelienn** b. Sae diavaez spanaenn korrwazhied 'zo, perikit ouzh he ober (sl. *capil-laïre*(s), *péricytes*).

péritoine, TA **peritoneum** ◇ **peritoneum** ◇ **ampelenn** b. Lienenn levrus, ouzh he ober ur feilhenn a-speur o pallennañ talbenn diabarzh kavennou ar c'hof hag al lestr, ur feilhenn a-flugez o c'holeiñ an darn vuiañ eus an organoù endalc'het ganto,

hag asplegoù lienennek o keneren an div feilhenn, anezho rouedennoù, danterioù, stagelloù; etre an div feilhenn emañ kavenn an ampeleñn, mannek ent reol, a ranner etre daou hoskad, etrezo rouedenn ar c'holon treuz (sl. *cavité abdominale, cavité pelvienne, cavité péritonéale, méso-*).

péritoine : **maladie gélatineuse du** ~ ◇ **gelatinous ascites** ◇ **torliñv g. gludek** Fennadur en ampeleñn eus ul liñvenn c'hludek o tont diwar fregad ur c'hist mukinvanek (kist ar vierrez dreist holl, pe ar pervez).

péritonisation, autoplastie péritonéale ◇ **peritonization** ◇ **ampeleñañ, ampeleñnerezh g., unanatelviñ an ampeleñn** Lankad eus an torenbenañ, anezhañ goleiñ gant levrigenn an holl dachadoù arwadas, e doare ma harpo ar pervez ouzh ur gorre levn ha pallennet gant endotelienn (sl. *cruenté, laparotomie, séreuse*).

péritonite ◇ **peritonitis** ◇ **ampeleñnfo g.** Tanijenn an ampeleñn, lemm pe henek, kentael pe, hogos bepred, eilvedel; lies seurtad a zeskriver hervez he astennded : strewek pe lec'hiek en dro d'un organ, ha hervez he arbenn : *a. diwar dreloezad* (Gl. *p. par perfora-tion*), *a. torzhellek* (Gl. *p. tuberculeuse*), h.a.; *a. pourc'hus* (Gl. *p. encapsu-lante*) a reer eus un anaez liesarbenn, naous dre ar furnidigezh diwar goust an ampeleñn eus ur gennenn dev, gwenn nakret, o vac'hañ un darn bras pe vrasoc'h eus organoù ar c'hof.

pérityphlite ◇ **perityphlitis** ◇ **trosac'hennfo g.** Tanijenn an ampeleñn en dro d'ar sac'henn.

périurétérite ◇ **periuureteritis** ◇ **trosandroazhfo g.** Tanijenn, henek alies, ar gwiad kellaouek en dro d'ar san droazh, rouestlad d'ur sandroazhfo peurvuiañ.

périurétrite ◇ **periuuretritis** ◇ **trogantroazhfo g.** Tanijenn ar gwiadoù en dro d'ar c'han troazh, pe henek, pe lemm (morfer), hag, en dro-mañ, hevonn (*pugnez troazhadel*, Gl. *abcès urinaire*, pe *yoc'henn droazhadel*, Gl. *tumeur urinaire*), pe strewek (*ensiladur troazh*, Gl. *infiltration d'urine*).

périviscérite ◇ **perivisceritis** ◇ **amflugezfo g.** Tanijenn henek al levrigennoù en dro d'ar flugez (kevreted un ampeleñnfo, ur c'hreznennfo hag un amgalonennfo a furn sec'h); arveret e vez hiziv Gl. *périviscérite* da aroueziñ an *ampeleñnfo torzhellek henek stirenglenus* (Gl. *péritonite tuberculeuse chronique fibroadhésive*) lec'hiet en ur rann eus ar ganol vezhur.

perlèche ◇ **perleche** ◇ **tarle g.** Kroc'henad kuñv diwar hadennoù diseurt, tredizhus, naous dre ur graspad daouduiek sezet e freilhoù an divweuz, rouestlad a'n impetigo o tizhout ar vugale dreist holl (sl. *cheilite angulaire*).

perlingual ◇ **perlingual** ◇ **treuz-teod, treuzteodel aa.** A-zivout ar mod diounit al liaoù, dodet dindan an teod hag assuget gant ar glourgenñ.

Perls : **coloration de** ~ ◇ **Perls test** ◇ **prouad g. livadur g. Perls** alvezder gwiaodonezh e amkan lakaat war wel an *hemosiderin*, a ya gantañ al livrezh glas prusian p'en arwerc'her dre an drenkenn glorhidrek hag ar ferrokianidenn galiom.

perméation ◇ **permeation** ◇ **dazoliñ, dazolad g.** Treled ar c'helligoù kankrek a-hed al limfforzhoù ha dedaoladur ozvennoù kankrek (*ozvennoù d.*, Gl. *nodules de p.*) strewet en dro d'an anaf kentael.

(-)perméab-

• *augmentation de la perméabilité des capillaires* heforshaat ar c'horrwazhied • *canal devenant imperméable à la naissance, resté anormalement perméable* kanol o vont anforzhiek d'ar c'hanedigezh, chomet forzhiek ent ezreol • *cassette perméable aux rayons X* kased boull d'ar skinoù X • *coefficient de perméabilité* gwezhiader hedreuzded • *diminution de la perméabilité artérielle* isforzh an talmerennoù • *membrane à forte perméabilité* kennenn gourhedreuz • *membrane semi-perméable* kennenn handreuz • *perméabilisation des vaisseaux* heforshaat ar gwazhied • *perméabilité des capillaires* forzhegezh ar c'horrwazhied • *perméabilité des fosses nasales* heforzhded ar c'havennoù fri • *perméabilité du canal artériel* anstankadur ar san dalmeriel • *perméabilité sélective de l'endothélium* hedreuzded diuzel an endotelienn • *réduire la perméabilité des capillaires* leiaat heforzhded ar c'horrwazhied • *reperméabiliser une artère* adheforshaat un dalmerenn • *rétablir la perméabilité d'un vaisseau* azforzhekaat ur wazhiedenn • *thrombus encore perméable* trombuz hedreuz c'hoazh • *tissu imperméable* gwiaod antreuz.

permet-

• *lunettes permettant la vision très rapprochée* lunedoù o kevaraezañ merzhout ergorennoù nes tre • *appareil permettant de marcher* benveg o lakaat en araez da vale • *processus qui permettent l'assimilation des nutriments* argerzhioù araez da vevelaat ar maguzennoù • *propriété qui permet aux liquides de s'étaler* perzh o reiñ tro d'al liñvennoù da emledañ • *technique permettant la séparation des composants d'un mélange* kalvezder oc'h araezañ disrannañ kedrannoù ur meskad.

permictonnel ◇ **permictonal** ◇ **trezeziouladel aa.** O tarvezout e-kerz an dezioulañ.

pernicieux, malin ◇ **pernicious, malignant** ◇ **arialek aa., yud aa.** A-zivout furn c'hrevus ur c'hleñved (sl. *anémie p., fièvre p., malin*).

NOTENN : Hervez an aozerion hag ar boazioù gwriziennet el lavar mezegel ez ez eo neuenns ar c'heñver ster etre au daou dermen, ar re-mañ o vezañ arveret gwech evel kensterioù, gwech evel dispartius (sl. div notenn ar mellad *malin*).

perniciosité ◇ **malignant** ◇ **arialegezh b., yuter g.** Grevusted vras gant furnoù eus kleñvedoù 'zo (amwad, paludegezh).

perniose ◇ **perniosis** ◇ **pernioz g.** Termen kinniget gant aozerion 'zo evit erdalañ al livedo, eritrokianoz an divesker, an akrokianoz hag eritem argalet Bazin (sl. *acrocyanose, érythème induré de Bazin, érythrocyanose des jambes*).

peropératoire ◇ **peroperative** ◇ **treoberatael aa.** A-zivout an oberoù renet e-kerz ar gwezhiadennoù surjaniel.

Perou : baume du ~ ◇ **Peruvian balm** ◇ **balzam Perou** Rousin frondek tennet eus kef ur wezenn eus Kreizamerika, ar *Myroxylon pereirae*, danvezet en apotikerezh evel dilester ha kraostuzenn.

peroxydase ◇ **peroxidase** ◇ **peroksidaz** g. Enzim oksider en araez da ec'haozañ ar beroksidenn hidrogen (H₂O₂ pe *dour oksigen*, Gl. *eau oxygénée*) en ur zilaoskiñ oksigen gweredek; nes eo ar *p.* d'ar c'hatalaz (sl. *catalase*), a zo ennañ an un stroll prostetek, kevarall avat e barzh proteinek.

peroxysome ◇ **peroxysome** ◇ **peroksizom** g. Rannig bezant e kitoplasm ar c'helligoù struzhel ha loenel, enni enzimoù (katalaz, urikaz, amino-oksidad); nebut anavezet eo c'hoazh roll bevoniell ar peroksizomou; dasperzhiañ a rafent en aozañ hag en ec'haozañ ar beroksidenn hidrogen, en arouleviañ gremmel ar gellig, en enaozañ an amindrenkennoù hag en oksidañ an trenkennoù druz.

Perrin-Ferraton : maladie de ~, **hanche à ressaut** ou **à ressort** ◇ **Perrin-Ferraton disease** ◇ **kleñved Perrin-Ferraton**, **lez b. war zislamm** Ezreolder naouus dre ur stlakad berr o c'hoarvezout da geñver loc'hadoù 'zo eus al lez, e dianlen un diskrog eus parzh krec'h ar faskienn ledan bet luget gant an trovaleg bras, re valirek.

persécuté ◇ **persécutéd** ◇ **1 keskinet** aao. **2 heskined** g. **-idi** 1 Gant an ambren heskinadur. 2 Gouziviad an ambren heskinadur.

persécution : **délire de la ~** ◇ **persecution complex** ◇ **ambren b. heskinadur** Anglevout e gaou realezh an amgen evel galen : ervannañ a ra ar gouziviad ouzh an amgen an argadusted dic'houzañvadás ha diemouez a zo ennañ (sl. *délire, idées de persécution*, GBLF §§ 650, 862, 865, 937, 994).

persévération ◇ **perseveration** ◇ **daraspad** g. Anadenn nerval, anezhi an aspad ezreol eus un erzerc'had kigennel reol; div furm a zeskriver : an *d. fiñvel* (Gl. *p. clonique*), pa vez un ezel oc'h arren lies gwech ar fiñvad emañ o paouez ober; an *d. tantel* (Gl. *p. tonique*), pa chom argreuz ur gigenn pell pe belloc'h amzer goude un argrezad reol; anadennoù da ziforc'hiñ diouzh an anadenn vredel ez eo an *daradfiñv* (Gl. *p. palicinésie, palikinésie*), arreata ur fiñvad, ur jestr alies, er-maez a nep arc'hwelañ reol (sl. *écholalie, échographie', échonomie, échopraxie, palicinésie, palikinésie, stéréotypie*).

personnalité ◇ **personality** ◇ **personelezh** b. Termen ankiantel arveret e meur a ziskiblezh, "a gontet ur 50 despizadur anezhañ" (Allport); er bredelfennerezh ez eo kevastenn ar *p.* d'ar *benvegad bred* (Al. *psychischer Apparat*, sl. GBLF § 91); er vredevezekniezh e reer kel dreist holl eus *strafuilhoù ar p.* (sl. *dédoublement de la personnalité, dépersonnalisation, étrangeté : sentiment d'*~, La18 106108); ampartet eo keal ar *p.* da gentañ diwar arseliñ realezh an dud, ha stadañ enni naouusteroù padek, evel doareennoù an neuzid, ar c'hantouezañ hag ar c'hantaenzañ, ar meizañ, an ersaviñ, an hambout, h.a., d'an eil diwar emouezañ ouzh an unan, a ra d'an hinienn emanaout evel ur *me* o trebadout en e gevanded, eleze o treñiñ (sl. La-10 266-267).

persorption ◇ **persorption** ◇ **edsugañ** Enteñt etre kelligoù epitelienn ar pervez rannigoù boued sonnel (sk. : greun ampez) o vont betek 150 µm treuzkiz.

perspiration ◇ **perspiration** ◇ **treaezhiñ** Eskemm aezhennoù a-dreuz d'ur gennenn; er vezekniezh e reer anv a *t. kroc'hene* (Gl. *p. cutanée*) da aroueziñ an ezvevennañ dour aezhel ha dioksidenn garbon hag an desunañ oksigen gant ar c'hroc'hen.

perte de chance sanitaire de survie ou **de guérison** ◇ **loss of chance to survive** ou **to be healed** ◇ **koll an dro da zreistbevañ pe da bareañ** Termen eus an hanc'herieg lezennel oc'h aroueziñ ur c'haouadenn pa c'houseseller un ere arbennel etre ur gwezh mezegel hag ur rouestlad (sl. *aléa thérapeutique*).

perte

• *cécité (symptôme)*, *perte de la vue* pe *de la vision* dallder • *comportant une perte de substance* enloezadek • *néphrite avec perte de potassium* lounezhfo kaliomadav-adel • *perte de conscience* pe *de connaissance* koll ar genskiant, semplañ • *perte de la contractilité* anargrezusted • *perte de potassium* kaliomadavad • *perte de sang, saignement* diwad • *perte de substance, géode* enloezad • *perte des phalanges* koll an oeñsoù • *perte des réflexes* steuz an damougoù • *perte du pouvoir de concentration (urinaire)* isdevec'hiusted • *perte du tonus dans les membres inférieurs* eztantañ an izili traoñ • *perte, fausse couche, avortement spontané* kolladenn, sioc'haniñ emdarzh • *pertes blanches, leucorrhée* gwennaouez, krozhver • *réparer une perte de substance labiale* dazluniañ ur weuz enloezadek • *somme arithmétique des apports et des pertes d'une substance donnée* sammad niveroniell enankadoù hag ec'hankadoù un danvezenn lavaret • *soudure accidentelle des lèvres sans perte de substance* soutadur a-zarvoud an divweuz hep enloezad.

Perthes : **épreuve de ~** ◇ **Perthes test** ◇ **proud Perthes** Proud amkanet da imboure'hiñ amred gwazhiennel don an ezel traoñ; arloañ a reer ur rolt damstardet dindan wareg ar wazhienn spis; goude ur munudvezhioù bale, e plad an teuc'helloù dindan ar rolt mar bez bonan ar gwazhiennoù don dre ma vez andreuget an amred gorre etrezek enno.

pervenche ◇ **periwinkle** ◇ **rouanez** b. Geotegenn eus kerentiad an Apokinakeged; eus ar *r. vihan* (*Vinca minor*), plantenn voutin en Europa, e touhennet ar *vinkamin*, alkaloid diounezet ouzh heskwad an empenn; eus ar *r. vras* (*Vinca major*), gounezet e Madagaskar, e touhennet ar *vinblastin* hag ar *vinkristin*, alkaloidoù ergemennet evel enepkankreier.

pervers ◇ **perverse** ◇ **1 troziat** aa. **2 troziad** g. **-ed 3 troziat**, **troziadel** aa. **4 emwariat** aa., **trozonius** aa. **5 emwariat** g. **-ed 6 emwarel** aa., **trozoniel** aa. 1 Gant troziadezh. 2 Den troziat. 3 A-zave d'an drozhiadezh. 4 Gant emwar, gant trozoni. 5 Den emwariat, den trozonius. 5 A-zave d'an emwar, d'an drozoni.

perversion ◇ **perversion** ◇ **troziadezh** b. Gwarder an doare da walc'hañ un ezhomm pe da leuniañ ur c'hoant; *t. an avez* (Gl. *p. du goût*) eo ar malakia (sl. *malacia*), *t. ar c'hwesha* (Gl. *p. de l'odorat*) eo al louvre (sl. *cacosmie 4*; abaoe Freud, e talvez

t., arveret hep hogozen, da venegiñ an *t. revel*, “gwariadur e-keñver ar gread revel reol”, eleze an heñvelreviadezh, ar vaboriadezh, an henadoriadezh, ar viloriadezh, ar c’helanvlisa, ar vazoc’hegezh, ar sadegezh, an diskorata, ar fetichegezh, an troazhvlisa, h.a. ; goude despizañ ar “c’hediañ revel reol evel embarañ kalc’hgouinel etre daou zen arallreviat oadour hag a oadoù nes”, e tisklerie Freud “ez eo an tued d’an droziadezh lodek er genezh lavaret reol” (sl. *bestialité, exhibitionnisme, fétichisme, homosexualité, masochisme, nérophilie, pédophilie, pica, sadisme, urolagnie*, GBLF § 903).

perversité ◇ **perversity** ◇ **emwar g.**, **trozoni** b. Neuzid ha realezh un den o tiskouez krizderi, drougiezh gant bliz o noazout.

pes adductus, metatarsus adductus, metatarsus varus ◇ ◇ **troad endurc’haet, kreiztroad enkam** Kammneuziad an troad o c’hoarvezout eus gwariadur eskern ar c’hreiztroad war ziabarzh e-keñver ahel an troad.

pes supinatus ◇ ◇ **troad solsavet** Kammneuziad an troad, anezhi ur c’hweladur 90° war ziabarzh eus ar raog troad, ar sol o skeiñ war diabarzh, an treñv troad o chom reol.

pessaire ◇ **pessary** ◇ **pesar** g. -où Gwalenn hebleg e mezell pe e silikon a ebarzher er gouin evit arzerc’hel ar grozh ha parraat ouzh un islink pe ur c’hwelad (sl. *antéversion, prolapsus, ptose, rétroversion*).

Pestalozzi : anévrisme de ~ ◇ **aneurism of Pestalozzi** ◇ **darvoul g. Pestalozzi** Fennad gwad e-barzh gouin limfel ar gwazhied, a stader ken e gwadliñv, ken e boukadur an empenn.

peste ◇ **pest, plague** ◇ **bosenn b.** Pore darreuziadek ha tredizhus grevus kenan, naouus dre un derzhienn uhel, ustead kalon, breanal, malouen, alfo hag, e 90 % eus an degouezhioù, dre an dinod eus gwerbloù en divgazel hag en divvarlenn (*b. werblek*, Gl. *p. bubo-nique*), dre arouezioù tanijenn a ’r skevent (*b. skeventel*, Gl. *p. pneumonique*, an hini c’hrevusañ, marvus dindan 2 pe 3 devezh), dre wadliñvoù a ’r c’hroc’hen hag ar glaourgennoù (*b. du*, Gl. *p. noire*), pe dre daolenn ur wadlestegezh feudek; treuzfurm et eo bet an erdeb gant ar bevastalerioù diounezet abred; kiriek d’ar *b.* eo bazhell Yersin, *Yersinia pestis*, dezhi da virvaou krigneret gouez ’zo, skignet gant ar razhed ha trezoget d’an den dre hanterezh ar c’hwenn; broezeziadek e chom ar *b.* en rannbarzhioù kreiz Azia, kreiz Afrika hag e broezioù ’zo eus Amerika.

peste aviaire ◇ **avian plague** ◇ **bosenn an evned** Kleñved darreuziadek diwar un *Orthomyxovirus* o washañ ar yer hag evned all e rannbarzhioù norzh Italia, naouus dre ur morvor don o tisoc’h hogos bepred gant ar marv (sl. *grippe aviaire*).

peste bovine ◇ **cattle plague** ◇ **bosenn ar bioù** Pore enkoradus ha tredizhus o tizhout ar bovideged, en araez avat da wazhañ spesadoù all (deñved, givri, kañvaled), o reuziañ e kreiz Azia hag en Afrika; kiriek eo dezhañ ur viruz, naouus dre ur stad tifoidel grevus kenan ha glaourgennoù gouliezus ar gevresae, kavennoù ar fri, ar genoù hag ar gouin.

peste endogée ◇ **latent plague** ◇ **bosenn enkelat, bosenn diarbri** Darreuziad adlusket diwar grigneret deuet da drigañ e douarennoù ma veve krigneret all a oa mirvaou bazhell ar vosenn.

peste équine ◇ **equine plague** ◇ **bosenn ar c’hezeg** Pore an ekuideged o reuziañ en Afrika, naouus dre erzerc’hadoù darwazhel ha gouliñvel er skevent dreist holl ha dre un dedro herrek, marvus alies, kiriek dezhañ ur viruz trezoget moarvat gant an amprevan.

peste porcine ◇ **swine plague** ◇ **bosenn ar moc’h** Pore tredizhus, darreuziadek, enkoradus, diwar ur pestiviruz, o wazhañ ar moc’h, antreuzkasadus d’an den, naouus dre un darallad don a ’r stad hollek gant erzerc’hadoù skeventel, koazhadel, nervel, un eritem purpurek hag un dedro herrek etrezek ar marv.

pestiféré ◇ **plague patient** ◇ **1 bosennek** aa. **2 bosenneg** g. -eion 1 Tizhet gant ar vosenn. 2 Gouziviad ar vosenn.

Pestivirus ◇ **Pestivirus** ◇ **Pestivirus** g. Genad viruz eus kerentiad ar *Flaviviridae*, gougevret outañ viruz bosenn ar moc’h.

pétéchial ◇ **petechial** ◇ **1 fennigaouek** aa. **2 fennigaouus** aa. **3 fennigaouel** aa. 1 Gant fennigoù. 2 O tevoudañ fennigoù. 3 A-zave d’ar fennigoù.

pétéchies ◇ **petechia** ◇ **fennigoù**, u. : **fennigenn** Furm purpura, ezfuad gwad eus korrwazhied ar c’hroc’hen, naouus dre diennnoù ruz-persdu, a-zasken o ment etre 1 ha 3 mm treuzkiz.

Peters : syndrome de ~ ◇ **Peters anomaly** ◇ **azoniad Peters** Ezreolder ganedigel eus parzh arak al lagad, naouus dre un demerez kreizel ha don a ’r gornsaer hag anafoù an envez (sinekiezhioù arak, gwalennek hollel pe darnel), daouduek peurliesañ hag o tec’han un dallder klok pe dost; kevret e vez alies gant ezreolderioù lagadel all (loakerrezh, nistagmuz, glaokom, ferennlug) ha kammneuziadoù diseurt : kalonel, koazhadel, mizlid ar gweuz, empennfoeñv, korrlopennegzh; e dianlen ur c’hrouellnaoued e targouezhfe.

Petges-Cléjat : maladie de ~, poikilodermatomyosite type Petges-Cléjat ◇ **Petges-Cléjat syndrome** ◇ **kleñved Petges-Cléjat, poikilodermatomioziz rizh Petges-Cléjat** Azoniad naouus dre gevreted anafoù kroc’hen (isteñv gant korrwazhiedusvoll ha livegad brizhellek), isteñv ar c’higennoù, mioskleroiz muiek e gourizoù an izili o tevoudañ enno andraftad ha distummadur; dedreñ a ra en un doare henek; kleñved renket e stroll an dermatomiozitoù (sl. *dermatomyosite*).

Petit : triangle de Jean-Louis ~, trigone lombal TA **trigonum lumbale** ◇ **lumbar triangle** ◇ **tric’hogn** g. an **dar-greiz** Tachenn dric’hornek loet e lodenn izelañ rannbarzh an dargreiz (TA *regio lumbalis*), etre kribenn ar glun (TA *crista iliaca*), kigenn ledanañ ar c’hein (TA *musculus latissimus dorsi*) ha kigenn veskellek diavaez ar c’hof (TA *musculus obliquus externus abdominis*); dre an *t. a. d.* e vez oc’h ogañ *avelennoù Jean-Louis Petit* (Gl. *hernies de J.-L. Petit*, Sz. *Petit hernia*), degouezh paotañ eus an avelennoù a-zargreiz (Gl. *hernies lombales*).

petit(-)

• à petits pas a-bilpaz • de petites dimensions bihanvent • délire d’énormité et délire de petitesse ambren an dergour hag ambren

an dergorr • *fer en de très petites quantités* kementadoù boc'hedel houarn • *impression de petitesse ou de gigantisme* anglevad a gorregezh pe a ramzegezh • *la plus petite unité fonctionnelle* an unvez arc'hwelel izek • *petit bassin* lestr bihan • *petit lait, lactosérum, mègue* laezhvez, gwipad • *petit mal épileptique, épilepsie mineure* droug bihan, droukfell leiek • *petit silence (bruits du cœur)* tav bihan • *pouls petit et calme* poulz bihan ha reizh • *petite enfance* mabaniezh, mabanvezh • *petitesse anormale de la corneé* bihanded ezreol ar gornsaec • *petitesse d'un organe, atrophie* isvent • *très petit, infinitésimal* boc'hedel.

pétreux ♦ **petros** ♦ **karregennel** aa. A-zave da lodenn garregennek an askorn ividig (TA *pars petrosa (os temporale)*).

Petri : **boîte de** ~ ♦ **Petri disk** ♦ **klozenn** b. **Petri** Endalc'her kelc'hiek, ouzh e ober div gib plat skarvet; hadennañ a reer an anvrad tiñvañ bet skuilhet er gib traoñ ha lakaat ar glozenn en tesaer; trevnad arveret evit dispartiañ ar c'hudadoù bakteri.

pétrissage ♦ **petrissage** ♦ **mezañ** Embreg merata, anezhañ gwaskañ ar gwiadoù etre meud an eil dorn ha pevar biz diwezhañ egile en ur riklañ gorrek an daou balv war ar parzh korf a leuñver evit prederiañ an amwiskad hag ar c'higennoù bas pe ar c'higennoù don hag ar faskiennoù (sl. La-18, 231).

pétrosite ♦ **petrositis** ♦ **karregennfo** g. Askornfo don ar garregenn, hogos bepred e dianlen ur skouarnfo krenn.

(-)**pexie** ♦ **1 (-)pexia, pexis, 2 (-)pexy** ♦ **1 (-)lenañ 2 (-)Aanlenañ** 1 Festañ, gronnañ un danvezenn er gwiadoù, sk. : *aourlenañ* (Gl. *chryso-pexie*). 2 Stagañ, festañ surjaniel un organ pe ur parzh organ, sk. : *Aanlenañ kalon-danter* (Gl. *cardiomentopexie*), *stagellAanlenañ* (Gl. *ligamentopexie*).

Peyer : **plaques de** ~ ♦ **Peyer patches** ♦ **pannoù** l. (g.) **Peyer** Bolc'hennoù limfoidel endan-c'hlaourgenn e-barzh lodenn dibenn ar vouzelenn voan; foek ha gouliezek e vezont en tifoid (sl. *MALT*).

Pezzer : **sonde de** ~ ♦ **Pezzer catheter** ♦ **sont** g. pe **kateter** g. **Pezzer** Sont bazoulek en e zibenn, amkanet da wehenniñ ar c'hwezhihell goude ar c'hwezhihelladforzhañ.

Pfeiffer : **syndrome de** ~ ♦ **Pfeiffer syndrome** ♦ **azoniad Pfeiffer** Seurtad bizanskar-tourbennegezh (Gl. *acrocéphalosyndactylie*) hêrezhel treuzkaset er mod otozomek trec'hek, leiek gantañ kensoutadur ar bizied, ushedek ar bizied troad, usledek ar meudoù hag ezvezant an dilere'h bred (sl. *acrocéphalie, syndactylie*).

pH ♦ **pH** ♦ **pH** (Teskanv Sz. *power of hydrogen*, La *potentia hydrogenii*, Gl. *potentiel hydrogène*) Arventenn o tewerzhañ trenkegezh un dourzilezhenn dre araez al logaritm eus gin ar bec'h ion H⁺ anezhi : pH = -log₁₀[H⁺]; ur pH = 7 a verk un dilezhenn neptu, ur pH < 7 unan drenkek, ur pH > 7 unan vazek; ent reol e vez 7,4 pH ar gwad talmerel ha 7,34 pH ar gwad gwazhiennel.

phacocele ♦ **phakocele** ♦ **ferennogad** g. Diempradur daraezien ar ferenn dindan ar gevresae.

phacoémulsification ♦ **phakoemulsification** ♦ **ferennlivrizhañ** Hentenn ezvenañ ar ferenn o kevrediañ ar bruzunañ anezhi dre an usstenioù, eroueriañ ha suc'hañ ar bruzun a-dreuz ur skejad er gornsaec.

phacoexérèse, phakoexérèse ♦ **phakoexeresis** ♦ **ferennezvenañ** Dilemel surjaniel ar ferenn.

phacolysé, phacolysé ♦ **phakolysis** ♦ **ferennloezañ** Liñvennañ ar ferenn dre araez enzimoù loezus goude digeriñ ar pourc'had anezhi.

phacomalacie ♦ **phakomalacia** ♦ **ferennvlodad** g. Boukadur ar ferenn.

phacomatose ♦ **phakomatosis** ♦ **fakomatoz** g. Stroll kleñvedoù ganedigel boutin etrezo kammneuziadoù an nervahel ha bezañs yoc'hennoù bihan (*fakomoi*, Gl. *phacomies*) a orin ektodermel loet e pontoù diseurt eus ar c'horf, en o zouez neurofibromatoz Recklinghausen (sl. *Recklinghausen : maladie de* ~), skleroz torosennek an empenn (sl. *sclérose tubéreuse du cerveau*), kleñved von Hippel-Lindau, naouus dre yoc'hennoù troadennek ensteudet war vegenn an nervenn weled (*f. al luc'hsae*, Gl. *p. rétinienne*) (sl. *apudome, Lindau : maladie de* ~).

phacome ♦ **phakoma, phacoma** ♦ **fakom** g. Yoc'hennoù ferennek a stader er fakomatozioù.

phacosclérose ♦ **phakosclerosis** ♦ **ferennskleroz** g. Argaledad ar ferenn.

phacoscopie, phakoscopie ♦ **phakoscopy** ♦ **ferennedrec'hiñ** Argerzhad imbourc'hiñ metier al lagad : ar gouziviad, lakaet en ur gambr teñval, o studañ e sell diouzh flamm ur c'houlouenn a-dreuz ferennoù kenforc'hus tre, a verzh an disterañ demereus eus e ferenn evel ur vrizhenn du.

phagédénisme ♦ **phagedenism** ♦ **fagedenegezh** b. Tued gant goulioù, angreizhoù, gouliezoù, livantoù 'zo da emastenn a-vas hag a-zon en ur herzel ouzh ar prederiadurioù.

phagocytaire ♦ **phagocytal** ♦ **1 fagokitel** aa. **2 fagokitadel** aa. 1 A-zave d'ar fagokit. 2 A-zave d'ar fagokitoz pe d'ar fagokitañ.

phagocyter ♦ **to phagocyte** ♦ **fagokitañ** Distrujañ dre fagokitoz (sl. *phagocytose*).

phagocytes ♦ **phagocytes** ♦ **fagokit** s. -enn Kelligoù araezus da *fagokitañ* (sl. *phagocyter*), eleze da engronnañ ha da zistrujañ e-barzh o c'hitoplasm korfoù estren sonnel (kelligoù darallet, bakteri), hag int gwech heloc'h (*granulokit* pe *mikroflag*, sl. *microphages*, ha *monokit*, sl. *monocytes*), gwech diloc'h e-barzh ar gwiadoù (*fagokit mononuklear* pe *macroflag*, sl. *macrophages*); dasperzhiañ a reont a) e difennerezh ar bevedeg e doare anspesadel (fagokitoz, pinokitoz), pe spesadel dre geveliañ gant al limfokit B ha T, b) e kennevid al lipid, ar protid hag ar glukid.

phagocytose ♦ **phagocytosis** ♦ **fagokitoz** g. A-berzh ur gellig, pakañ ha deloezañ rannigoù sonnel; gant ar bevion unkelligel e talvez ar *f.* da euvriñ an danvezennoù magañ; gant ar bevedegoù lieskelligel ez eo ar *f.* un argerzh difenn, ouzh ar garvevion

pergen, araezet gant ar fagokit a-gevel gant an antikorfoù hag ar glokaenn : ar bakteri, eraoet gant an opsonineir (sl. *opsonine*), deloc'het dre gimidreñ (sl. *chimiotoxicisme*), a ya da lenañ ouzh ar fagokit (lankad ar glenañ); da heul, e vezont euvret, engronnet e-barzh vakuol ar fagokit (*fagokitom*, Gl. *phagocytome*) ha traoliet eno gant enzimoù al lizozomoù (sl. *lysosomes*, *phagocytes*).

phagomanie ◇ **phagomania** ◇ **bouedvar** g. Tech anharzadus, darluskek pe mac'hennek, da zebriñ boued (sl. *boulimie*, *hyperphagie*, La-07 88-90).

phalange, **TA phalanx** ◇ **phalanx** ◇ **oeñs** g. Askorn eus atel ar bizied dorn ha troad (daou anezho evit ar meudoù, tri evit ar bizied all); anvet int *o. nezek* (TA *p. proximalis*, kent : Gl. *première p.*), *o. krenn* (TA *p. media*, kent : Gl. *phalange*), *o. pellek* (TA *p. distalis*, kent : *phalange*).

phalangisation ◇ **phalangization** ◇ **1 oeñsaat 2 ec'hanskarañ** 1 Oberatadenn amkanet da assav an arc'hwel gavaelañ en un dorn muturniet (goude ambid ar bizied) dre zonoat ar freilh etre-bizied ha treuzlenañ stirenoù 'zo. 2 Prederiadur surjaniel ar bizanskar, anezhañ dispartiañ surjaniel ar bizied kensoutet (sl. *syndactylie*).

phalangose ◇ **phalangosis** ◇ **falangoz** g. 1 Furm *trichiasis* e dianlen ar vezañs eus lies rezad malgud, ar rezad adreñv, drekstouet, o vliañ ar gornsaes (sl. *distichiasis*, *entropion*, *trichiasis*, La-07 46-48). 2 Laoskted ar valvenn diwar ur seizi.

phallique : **stade** ~ ◇ **phallic stage** or **phase** ◇ **pazenn b. gastrel** Pazenn eus frammadur bugelvezhel al libido o tont war lerc'h ar pazennoù genaouel ha fraezhel, merket gant unanadur al luzadoù darnel dindan hol an organoù genel, gant angreriadur an organ gourel nemetken, ar c'hastr pe falluz, buhezet evel bezant no ezvezant (sl. GBLF §§ 909, 1256).

phalloïdien ◇ **falloïdel** aa. A-zave d'an *Amanita phalloides*, spesad foue pistrus kenan; taolenn ar *pistriadur falloïdel* : goude un enkelvezh etre 8 hag 18 eurvezh da heul euvriñ ar c'habell touseg, e tarvez laurioù kof, c'hweladoù, un darc'hoal, gwadek a-wechoù, un दौरisvec'hiañ, direizhoù dourekvionel ha marvennad a 'n avu en ervez da zevoudañ ur c'homa marvus.

phanères ◇ **skin appendages** ◇ **faner s. enn** Termen genadel oc'h arouezañ an dedaoladoù ezkroc'henel hewel, evel ar blev, an ivinoù, an dent, h.a.

phaque, **phake** ◇ ◇ **keferenn** aa. A-zivout ul lagad a zo bezant ennañ e ferenn (sl. *aphakie*, *aphaque*).

pharmaceutique ◇ **pharmaceutical** ◇ **apotikerezhel** aa., **liaerezhel** aa., **apotikel** aa., **liael** aa. A-zave d'al liaerezh (sl. *médicament*, GEAK 167).

NOTENN : An deveradoù reolennek eo *apotikerezhel*, *liaerezhel*. Kinnig a c'haller war un dro *liael* hag *apotikel* hervez pleg ar yezh da gurzhañ an adanvioù deveret diwar ar pennanvioù en *-erezh*, sk. : *politikel*, furm kurzhet diwar *politikerezhel*.

pharmaceutique : **art** ~ ◇ **pharmaceutical art** ◇ **liaouriezh** b. Arver an anaoudegezhioù war al liaerezh evit oberiañ pe brientiñ liaoù.

pharmaceutique : **chimie** ~ ◇ **pharmaceutical chemistry** ◇ **liaerezh g. kimiek**, **liagimiezh** b. Skourr eus al liaoniezh (sl. *pharmacologie*) o studiañ ar c'hediadoù kimiek danvezet da oberiañ liaoù.

pharmaceutique : **formule** ~ ◇ **pharmaceutical formula** ◇ **delun g. lia** Arhebad an araezadoù ret da brientiñ ul lia.

pharmaceutique : **industrie** ◇ **pharmaceutical industry** ◇ **ijinerezh g. liael** Gennad armerzhel ma vez imboure'het, aozet ha kenwerzhelet al liaoù evit mezekniezh an dud hag al loened, stroll obererezhioù embreget gant ar c'hevredadoù bevgalvezouriezh hag ar greantioù apotikel.

pharmaceutique : **laboratoire** : ~ ◇ **pharmaceutical company** ◇ **kevredad g. liaerezh**, **greanti g. liaerezh** Stal an ijinerezh liael (sl. *pharmaceutique* : *industrie*).

pharmaceutique : **préparation** ~ ◇ **pharmaceutical preparation** ◇ **angevezh g. -ioù liael pe apotikel** Lia darbaret en apotikerezh; kemm a lakaer etre ar *mestrangevezh* (Gl. *p. magistrale*), danzeet gant an apotiker hervez ordrenañ ur mezeg (sl. *médicament magistral*) ha ar *bonangevezh* (Gl. *p. officinale*), aozet hervez un delun enskrivet el Liavoneg (sl. *Codex, médicament officinal*).

pharmaceutique : **spécialité** ~ ◇ **pharmaceutical specialty** ◇ **brientaozad liael pe apotikel** Lia oberiet ent greantel, arwerzhet en un arbarad dioutañ, debarzhet dezhañ gant Maodiernezh ar Yec'hed hag ar C'hedskor ar brientad mont en nevid.

pharmacie ◇ **pharmacy** ◇ **1 liaerezh g. 2 liaerezh b. -ioù**, **liaerdi g. -où**, **apotikerezh b. -ioù** 1 Teskad skiantoù ha kalvezderioù amkanet da imboure'hiñ, oberiañ, reoliñ ha gougorañ al liaoù. 2 Stavell ma prienter, ma kadaver ha ma c'hougorer al liaoù (angevezhioù ha brientaozadoù), ma werzher ivez aozadoù yec'hedel, traezoù ha binvioù evit an arouelioù (anroadoù, steudelloù, dafar surjianer-ezh bihan, h.a.), aozadoù louzaouerezh, gwezelerezh, frondoù (sl. *allopathique*, *galénique*, *homéopathie*, *médicament*, La-09 336-343).

pharmacie : **boutique d'une** ~ ◇ ◇ **stal b. ul liaerdi** Rann eus stavell ul liaerdi ma tegemerer an arvalion; hiziv, gant dispak Internet e vez kinniget liaoù dre stalioù keflinenn.

pharmacie : **préparateur en pharmacie** ◇ **pharmacy or pharmaceutical technician** ◇ **darbariad g. -ed liaererezh** Micher lezvezegel e reizhiad lezennel Frañs, implijad liaerdi, piaouer d'ur breoù micherel arbennik, o skoazellañ al liaer en e stal, o ren dornatadurioù dindan atebegzh ha reolerezh al liaer e unan hag engwiriet da brientiñ ha da c'hougorañ gwezharioù, da zornata pistrionnoù ha baderioù.

pharmacien ◇ **chemist**, **pharmacist** ◇ **liaer g. -ion**, **apotiker g. -ion** Den piaouer d'un diplom Stad a liaer, aotreet da zarbariñ ha da werzhañ liaoù ha gwezharioù liaek reizhfurm diouzh al Liavoneg (sl. *Codex, médicament, médicinal*).

pharmacocinétiq ◇ **pharmacocinetics** ◇ **liagorzhoniezh** b. Studi al lankadoù eus kennevid al liaoù er bevedeg : entoader, sugadur, treuzfurmadurioù, ezvevennadur; korzh (sl. *cinétique*) ul lia er bevedeg a zesaveler diwar-bouez un niver arventennoù : *hanterhoali* (sl. *demi-vie*), *dasparzh*, *renn plasmatek* (Gl. *pic plasmatique*), *dizeul* (sl. *clairance*) h.a., kevaraez da sevel *delvanoù liagorzhel* (Gl. *modèles pharmacocinétiques*) ha, drezo, da zarvanañ devoned pep lia hervez an aoziou diounit.

pharmacodépendance ◇ **drug dependence** ◇ **liaestoue** g., **gwezherestoue** g., **drammestoue** g. Teskad an anadennoù kleñvedel a ra da zanvezennoù kimiek 'zo bezañ diziouerus d'ar gouziviad, goude un prantad beveziñ : *baderioù* (sl. *stupéfiants*), *dic'hosterioù* (sl. *analésique*), *ambreiadoù* (Gl. *délirogè-nes*) *trezerc'heiadoù* (sl. *hallucinogène*), *mezeteiadoù* (Gl. *enivrants*), *bredusreerioù* (sl. *psychoanaleptique*); ent klinikel e ranner ar strafuilhoù etre azoniadoù ar bredestoue (Gl. *psychodépendance*) hag ar c'hreudestoue (Gl. *physicodépendance*) (sl. *accoutumance*, *addiction*, *assuétude*, *chimio-dépendance*, *dépendance*, *sevrage* : *syndrome du* ~, *toxicomanie*, La08 260-263, La10 162163, La-18 28-29, 32).

pharmacodynamie ◇ **pharmacodynamics** ◇ **lianiñvoniezh** b. Rann eus al liaoniezhoù o studiañ gwered al liaoù war ar bevedeg bonan.

pharmacogénétiq ◇ **pharmacogenetics** ◇ **liahiloniezh** b. Diskiblezh o studiañ delanvad ar parennoù hilel war erwezhoù ar bevedeg ouzh al liaoù.

pharmacologie ◇ **pharmacology** ◇ **liaoniezh** b. Skiant al liaoù en he c'hemeradur ledanañ, eleze studi kement danvezenn a orin naturel pe gevanaozel en araez da werediñ war ar bevedeg en amkan d'e gurañ, d'e ergurañ pe da wellaat e arc'hwelioù kreudel pe vredel; *l. klinikel* (Gl. *p. clinique*), studi gwered al liaoù war an den; *l. expérimentale* (Gl. *p. expérimentale*), studi gwered al liaoù war al loened.

pharmacologiste, **pharmacologue** ◇ **pharmacologist** ◇ **liaoniour** g.-ion Arbennigour war al liaoniezhoù.

pharmacomanie ◇ **pharmacomania** ◇ **liagaezh** g., **liagaezhiadezh** b. Sujadur bredel ha/pe kreudel d'al liaoù, ezhomm kaezhus da euvriñ liaoù (sl. *toxicomanie*, La-07 88-90).

pharmacopée ◇ **pharmacopoeia** ◇ **liava** g. kefridiel, **boneg** b. **al liaoù**, **liavoneg** b. Roll an diferadennoù kefridiel o tougen war ar gwezherioù en araez da vont er mestrangevzhoù hag er brientaozadù; bez' ez eus liavonegoù riezal (e Frañs, embannet e vez al liavaoù gant *Commission du Codex*, eleze Kengor al Liavoneg), ul liavoneg etrevroadel hag abaoe 1970, ul liavoneg europat (sl. *Codex*).

pharmacopsychologie ◇ **pharmacopsychology** ◇ **liavredoniezh** b. Studi al liaoù o werediñ war arc'hwelioù ar bred (bredwezherioù, sl. *psycho-trope*), danvez ar *vredoniezh arnodel* (Gl. *psychologie expérimentale*).

pharmacorésistance ◇ **pharmacoresistance** ◇ **liaharzusted** b. Ezvezañs gwered gant un pe lies lia.

pharmacothérapie ◇ **pharmacotherapy** ◇ **liagur** b., **liagurañ** Mezegañ dre araez al liaoù.

pharmacovigilance ◇ **drug monitoring** ◇ **liagost** g., **liagosterezh** g. Eveshaat miweredoù al liaoù fiziet en aozadurioù riezal hag etrevroadel, Kengorioù al Liagosterezh, en o c'hefridi dastum, marilhañ ha studiañ an arselladennoù daveet dezho (sl. *hémo**vigilance*, *matériovigilance*).

pharyngectome ◇ **pharyngectomy** ◇ **gargadennzevenañ** Dilemel darnel pe hollel ar c'hargadenn.

pharyngisme, **pharyngospasme** ◇ **pharyngismus**, **pharyngospasm** ◇ **raskrez** g. **ar c'hargadenn**, **gargadennandag** g. Argezadur dastrizhek kigennoù ar c'hargadenn; kemm a laka aozerion 'zo etre *pharyngisme* "argezadoù kigennoù ar g. en erwezhoù ar vezañs enni eus ur c'horf estren" ha *pharyngospasme* "andag feuls ar g."

NOTENN : Kinnig a ran arouezñ dre ar pennanv *raskrez* an argezadoù andagek ha laurus o tarvezout e kigennoù levn ur ganol : *raskrez an treizher*, graet ivez anezhañ *treizherandag* (Gl. *œsophagisme*, *œsophagospasme*), *raskrez ar gouin* (Gl. *vaginisme*).

pharyngite ◇ **pharyngitis** ◇ **gargadennfo** g. Tanijenn ar c'hargadenn (sl. *herpangine*).

pharyngographie ◇ **pharyngography** ◇ **gargadennluniñ** Erc'hwiliañ ar c'hargadenn dre ar skinkluniñ.

pharyngomycose ◇ **pharyngomycosis** ◇ **mikoz** g. **ar c'hargadenn** Gorank kuñv diwar *Leptothrix buccalis*, naouus ent klinikel dre ar vezañs eus pikoù gwenn war an huegoù, ar c'hargadenn ha diaz an teod.

pharyngosalpingite ◇ **pharyngosalpingitis** ◇ **gargadennkorzenno** g. Rouestlad ur gargadennfo e rezh maeloù ar gorzenn glevedel en ervez da zedreiñ etrezek ur skouarnfo krenn (sl. *catarrhe*).

pharyngoscopie ◇ **pharyngoscopia** ◇ **gargadennwereañ** Imbourc'hiñ kavenn ar c'hargadenn dre araez ar faringoskop, ardivink leteñvel ouzh al laringoskop (sl. *laryngoscopie*).

pharyngostomie ◇ **pharyngostomy** ◇ **gargadennnezforzhañ** Skarvañ a-greiz pe a-gostez kavenn ar c'hargadenn ouzh ar c'hroc'henn, unan eus tri lankad ar garloc'hennzevenañ; gwezh dewerc'het ivez evit eztennañ korfoù estren eus ar c'hroc'hargadenn; g. pe, gwelloc'h, *fic'h* ar *c'hargadenn* (Gl. *fistule pharyngée*) a reer eus ar c'hehentadoù gargadenn-kroc'henn, gargadenn-garloc'henn, gargadenn-briant kammeuziat pe arlenat da oberatadennoù.

pharyngotomie ◇ **pharyngotomy** ◇ **gargadennbenañ** Digeriñ surjiañ ar c'hargadenn ken dre ur flañchadenn a-zremm us-, is- pe treuzskoedenn, ken dre ur flañchadenn a-zerc'h pe kostezel hag aveskell.

pharynx, TA **pharynx** ◇ **pharynx**, l. : **pharynges** ◇ **gargadenn** b. Perhenteg aerforzhel-koazhadel kaherliennek e stumm ur founilh, loet a-us d'an treizher ha d'ar c'harloc'henn, teir lodenn ouzh e ober : 1) *lodenn afri* ar *c'hargadenn* (TA *pars nasalis*

pharyngis) pe *fric'hargadenn* (sl. **cavum**), 2) *lodenn a-c'henoù ar c'hargadenn* (TA *pars oralis pharyngis*) pe *rann c'henaouel ar c'hargadenn*, *genaouc'hargadenn*, *krennc'hargadenn* (sl. **oropharynx**), 3) *lodenn a-c'harloc'henn ar c'hargadenn*, (TA *pars laryngea pharyngis*) pe *gouc'hargadenn* (sl. **laryngopharynx**).

NOTENN : Ul lod hepken a gaver amañ eus an termenou arveret da envel lodennoù ar c'hargadenn. Evit hepkoriñ ar mesk e kinnigas aozerion an TA geriennoù fraezh. Ar re-mañ avat, en askont d'o hirder, n'o deus ket distroadet arver an termenou hennaouzel el lizheradur mezegel. D'hon tro, ekichen an TA e kinnigomp anvadoù brezhonek berr, ha se dre zaveiñ d'an termenou gallek en arver, neoazh en ur vont hebiou da zislavaroù 'zo, evel da skouer amster Gl. *cavum*, lakaet kevatal, gwech da TA *cavum pharyngis*, Br. *kavenn ar c'hargadenn*, gwech da TA *pars nasalis pharyngis*, Br. *fric'hargadenn*.

-phas-

- *anaphase* anafaz • *phase aqueuse* arvez dourel • *cycle diphasique* pe à *double phase* kor daoulankad pe daoulankadek • *la phase ultime de la leucémie* prantad olañ al leukemirzh • *onde monophasique* gwagenn unkoulz • *phase d'acuité de la maladie* pazenn lemmded ar c'hleñved • *phase de décontraction* lankad diargrezañ • *phase dispersée*, *phase dispersante* arc'hoalenn, arc'hronnenn • *phase gazeuse, liquide, solide* arvez aezhel, liñvel, sonnel • *phase (ou stade) d'arrêt de la croissance du cheveu au cours du cycle pileaire* pazenn a 'r blevglor ma paouez kresk ar blev • *phasemètre* koulzventer • *prophase* profaz • *troisième stade de la première prophase de la méiose* trede pazenn kentañ profaz ar meioz • *vibrations lumineuses de même fréquence et en phase* luc'hfroumoù untalm hag arunkoulz.

NOTENN : An deveradoù diwar ar stirann *phas-* o taveiñ d'ar gomz (sk. : *aphasie* ankomez) n'emaint ket meneget er mellad-mañ.

Phelps : *orthèse de* ~ ◇ **Phelps orthosis** ◇ **amsteudell b. Phelps** Amsteudell an ezel traoñ en erdu d'ar vugale nammet loc'hadel a-empenn (sl. *infirmité motrice cérébrale*).

Phemister : *opération de* ~ ◇ **Phemister operation** ◇ **gwezh g. Phemister** Hentenn brederiañ gaougenvelloù cheket ha steudet ar skin, anezhi sankañ un imboudenn askorn dindan amaskornenn talbenn diavaez ar skin.

phénol ◇ **phenol** ◇ **fenol** g. Anvad genadel ar c'hediadoù aromatek a zo enno un pe lies stroll (-OH) war ar c'harbonoù aromatek ; anvad an hini eeunañ anezho (C₆H₅-OH) a reer *trenkenn fenek* eus an dileizenn 2 % anezhañ ; hervez niver ar strollou fenol bezant er molekul, e komzer eus di-, tri- pe polifenoleier (sl. *polyphénol*).

phénolstéroïdes ◇ **phenolsteroids** ◇ **fenolsteroidoù** Stroll kediadoù ezvevennet dre an troazh, en o zouez an hormonou estrogen ha danvezennoù all leteñvel o luniad ha kevarall o ferzhioù bevedourel ; dezventañ a reer an holl gorfoù-se a-gevret dre hentenn Jayle dedalvezet war an douhennad fenolek eus an troazh ; ar feur reol anezho dre 24 h zo 200 µg gant ar gourev, etre 180 ha 250 µg gant ar venev.

phénothiazine : *dérivés de la* ~ ◇ **phenothiazine derivatives** ◇ **deveradoù l. (g.) ar fenothiazin** g. Stroll liaoù boutin en o molekul kraoñell d'ic'horvellek ar fenotiazin ; nervisreerioù (sl. *neuroleptique*) eo o deveradoù alifatek.

phénotype ◇ **phenotype** ◇ **fenotip** g. Erzerc'had eus glad hilel (sl. *genotip*) an hinienn daskemmet mui pe vui gant an amva ; gwechall, e raed eus ar genotip teskad an doareennoù anhezhel dec'hanet gant an amva, an teskad-se o vezañ anvet hiziv ar *peristaz* (Gl. *peristase*, Sz. *peristasis*).

phenolamine ◇ **phenolamin** ◇ **fenolamin** g. Danvezenn gevanaoz gourzhaler d'an adrenalin (alfadolc'her).

phénylalanine ◇ **phenylalanin** ◇ **fenilalanin** g. Amindrenkenn vevret eus ar steudad korvellek amparus d'ar proteinoù di-ziouerus d'ar beved, dedaoulet diwar dourrannadur ar proteinoù loenel ha struzhel ; lodek emañ er ristenn o tisoc'h gant enaoz ar c'hatekolaminoù (sl. *catécholamines*), diaraoger eo d'an tirozin.

phénylalaninémie ◇ **phenylalaminæmia** ◇ **gwadvec'h g. fenilalanin** Feur ar fenilalanin er gwad, reol etre 20 ha 110 µmol/l gant an oadourion (sl. *oligophrénie phénylpyruvique*).

phéromone ◇ **pheromone** ◇ **feromon** g. Danvezenn ezvorc'het gant un hinienn hag eraezet gant un hinienn all a un spesad, o tec'han ganti un erwezh dibarek : daskemmadoù en he realezh pe en he doareennoù bevedel ; bet dienaet er plant hag en amprevaned, ez eo diaesoc'h da studiañ roll ar *f.* e par ar mellkeineged (perzh an arouglevioù en hoalerezh revel).

-phil-

- *actinomycètes thermophiles* aktinomiket termofil • *adénone éosinophile* adenom eozinofil • *algophile* laurvreat, laurvread
- *algophile* laurvre • *algophilique* laur-vreel • *angiohémophilie* angiohemofiliezh • *anthropophilie* dengerc'h, dengerc'heg-ezh
- *anticorps hétérophile* antikorf etrerummadel • *antigène hétérophile* antigen etrerummadel • *antihémophilique* enephemofilek
- *aquariophile* pesklennour • *argy-rophile* argantlen • *basophile* bazennlen, bazofil • *basophiles* bazofil • *basophilie* bazennlen, bazofiliezh • *clinophilie* gweleagezh • *chromophile* livlen • *chromo-phil(o)lyse* livlensteuz • *colloïde hydrophile* kolloid dourlen
- *hydrophilie* dourlended • *coprophilie* kaoc'hvlisa, koc'hvlisadezh • *drosophiles* drozofil • *éléments cellulaires acidophiles* elfennoù kelligel trenkennel • *éléments cellulaires amphophiles* kedrannou kellig uelivlen • *éléments figurés azurophiles* elfennoù luniak azurlel pe azurofil • *éosinophile* eozinlen, eozinofil • *eosinophilie* eleozino-fil • *eosinophiles* eozinofil • *eosinophilie* eozinlen • *éosinophilique* eozinofilek • *halophile* halgar • *hémophilie* hemofilek, hemofileg • *hémophilie* hemofiliezh • *hémophiloïde* hemofiloid • *hydrophile* dourlen • *hydrophilie* dourlended • *hyper-éosinophilie sanguine* gwadelwenn eozinofil, gwadeleozinofil
- *insecte amphophile* amprevan daougerc'h, daougerc'her • *insecte anthropophile strict, facultatif* amprevan dengerc'h pe dengerc'hek strizh, amstrizh • *iodophile* iodlen • *lyoc, lyophilisat oral* liok, leizhlenad genaouel • *lyophiliser* leizhlenaat • *microaérophile* lavaervevat, lavaervevad • *nécrophilie* kelanoriadezh, kelanvlisa • *neutrophiles* neutrofil • *pic éosinophilique* bomm

eleozinofil • *polychromatophile* lieslivuzennlen • *polynucléaires neutrophiles* granulokit neutrofil • *spasmophilie* spasmodifliezh
• *virus zoophile* viruz milgerc'h • *zoophilie* milvreadezh.

philtrum, sillon sous-nasal, TA philtrum ◇ **philtrum** ◇ **filtrom** g. Nant a-zerc'h kreizer er weuz uhelañ.

phimosis ◇ **phimosi** ◇ **amgul** g. Strizhded c'hanedigel pe daraezien gweuz ar veskenn o virout ouzh houmañ a droñsañ a-dreñv ar gurunenn; *gweuzamgul, amgul ar genoù* (Gl. *phimosis labial*), strizhded faout ar genoù diwar verded an divweuz (sl. *blépharo-phimosis, paraphimosis, posthectomie*).

phlébalgie ◇ **phlebalgia** ◇ **gwazhiennost** b., **teuc'hell-ost** b. Laur anglevet war dreug gwazhiennoù teuc'hellek.

phlébectasie ◇ **phlebetasia, phlebetasis** ◇ **gwazhiennusvoll** g. 1 Muiadur kavnez ur wazhienn. 2 A-wechoù kenster da *teuc'hell* (sl. *varice*).

phlébectomie ◇ **phlebetomy, venectomy** ◇ **gwazhiennezvenañ** Dazbidañ un tamm hir pe hiroc'h eus ur wazhienn.

phlébite ◇ **phlebitis** ◇ **gwazhiennfo** g. Tanijenn ur wazhienn; termen a arverer peurliesañ e-lec'h *flebotromboz* ha *tromboflebit* (sl. *phlébothrombose, thrombophlébite*); deskrivañ a reer : ar g. *goulemm* (Gl. *p. subaiguë*), anforzhus, ma riskl ar gaouledenn stevius, puzuilh, da zilaoskiñ enfraouennoù (sl. *embolie, embolie*); ar g. *henek* (Gl. *p. chronique*), a orin falledhel (torzhelleg-ezh, kankr) pe pistriell, na zevoud ket bepred an anforzh, met skleroz ar speur (sl. *phlébosclérose*) hag alies un amsikad razek (sl. *phlegmatia cærulea dolens*); g. *an dezougen* (Gl. *p. des transports*, sl. *classe économique : syndrome de la ~*).

phlébœdème ◇ **venous oedema** ◇ **gouliñv** g. **gwazhiennien** Gouliñv e dianlen un diaezad en amred (teuc'helloù, gwazhiennfo).

phlébogramme ◇ **phlebogram** ◇ **1 gwazhiennbresenn** b. **2 gwazhiennlunad** g. 1 Kevregad dewerc'het dre araez un ardivink o lerc'hwezañ lammoù ur wazhienn, gwazhienn ar c'herc'henn peurliesañ (*kerc'hennbresenn*, Gl. *jugulogramme*) (sl. *mécánogramme*). 2 Skeudenn dewerc'het dre wazhiennluniñ.

phlébographie ◇ **phlebography** ◇ **1 gwazhiennbresennañ** **2 gwazhiennluniñ** 1 Dewerc'hañ ur wazhiennbresenn (sl. *mécánogramme*). 2 Skinluniñ ur wazhienn goude ensinklañ un Xdemerenn enni (g. *eeun*) pe en dalmerenn geñverek (g. *ameeun*).

phlébolithe ◇ **phlebolith** ◇ **gwazhiennvaen** g. **-vein** Fetisaenn razek amsiket a-wechoù e speur ur wazhienn.

phlébologie ◇ **phlebology** ◇ **gwazhiennouriezh** b. Studi ar gwazhiennoù hag an anaezioù anezho.

phlébopathie ◇ **venous disease** ◇ **gwazhiennad** b. Anaez ar gwazhiennoù.

phlébosclérose ◇ **phlebosclerosis** ◇ **gwazhiennskleroz** g., **fleboskleroz** g. Skleroz speur ar gwazhiennoù leteñvel ouzh skleroz an talmerennoù, an daou anaez o tarvezout peurliesañ en ur ser; e troioù 'zo e vez devoudet ar g. gant ar sankadennoù engwazhiennel (sl. *artériosclérose, injection*).

phlébospasme ◇ **phlebspasm, venospasm** ◇ **gwazhiennandag** g. Argrezad dasstrizhek e speurioù ur wazhienn.

phlébothrombose ◇ **phlebothrombosis** ◇ **flebotromboz** g. Ent klasel, seurtad tromboz gwazhiennel naouus dre ur gaouledenn englenet laosk ouzh ur speur chomet hogos reol, o neuenniñ enta en oaled ar wazhienn hep he feurstankañ; ent klinikel, e vez ar *f*, koulz lavarout hep azon lec'hel hag en orin enfreier arreat; an arbenn anezhañ ne ve ket tanijenn speur ar wazhienn, met ur strafuilh a 'r c'haouediñ div un dasset a 'r gwad; disheñvel eo enta diouzh an *tromboflebit* (sl. *thrombophlébite*); en devoud, e ve eus an daou anaez div stad dedreñv eus an kleñved.

phlébotomie ◇ **phlebotomy** ◇ **gwazhiennenbenañ** Flañchañ speur ur wazhienn evit eztennañ ur gaouledenn, ebarzhiñ ur c'hateter pe garzhañ gwad (*gwazhiennwadañ, gwazhiennwadad*, Gl. *saignée veineuse*, sl. *érythémie*).

Phlebotomus, phlébotomes ◇ **Phlebotomus, sandflies** ◇ **Phlebotomus, flebotom** s. Amprevan dipter gwadezat eus kerentiad ar *Psychodidae*, o trefougen d'an den an *derzhienn ouzh pappataci* (sl. *fièvre à pappataci*), ar *bartonelloz* (Gl. *bartonellose*) ha *leishmaniozou* diseurt (sl. *leishmaniose*).

phlébotonique ◇ **phlebotonic** ◇ **gwazhiennusreüs** aa., **gwazhiennusreer** aa. **2 gwazhiennusreer** g. **-ioù** 1 O kentraouiñ gwevnded ar gwazhiennoù. 2 Lia gwazhiennusreüs.

phlébotrope ◇ **phlebotropic** ◇ **gwazhiennwezher** aa. A-zivout ur prederiadur o werediñ war ar gwazhiennoù; termen arveret peurliesañ evel kenster da *gwazhiennusreer* (sl. *phlébotonique*).

phlegmatia alba dolens ◇ **phlegmasia alba dolens** ◇ **phlegmatia alba dolens** Furm c'houlemm a 'r gwazhiennfo oc'h erzerc'hañ dre ur gouliñv gwenn kevret gant laur hag andrafted, astennet d'ur parzh ezel pe d'un ezel a-bezh a zo trombozek ar bennwazhienn anezhañ; tizhet e vez ar c'har peurliesañ da heul ur gwilioud, ur gwezh surjaniel, ur pore, pe gant ar falledheion hag ar galongleñvion weleat.

phlegmatia cærulea dolens ◇ **phlegmasia caerulea dolens** ◇ **phlegmatia caerulea dolens** Seurtad gwazhiennfo o tarvezout a-gevret gant andag an dalmerenn, naouus dre un deroù feuls, al laur garv, ur gouliñv bloc'hek gant dulaz ha yended a 'n amwiskadoù, daralladur don a 'r stad hollek, koempad ha dedro grevus alies etrezek ar breinged hag ar marv zoken.

phlegmatia ◇ **phlegmon** ◇ **morfer** g. **-ioù** Poreadur ar gwiaed kellaouek endan-groc'hen pe don troflugezel, kantet pe strewek, diforc'hek spis, kevret gant marvenned eilvedel ar gwiaodoù tizhet; m. *koadesk* (Gl. *p. ligneux*), m. strewek, o tedreñv gorrek kenan, naouus dre galeted ler ar goevnenn; m. *bloc'hek Chassaignac* (Gl. *p. total de Chassaignac*), m. oc'h aloubiñ un ezel en e bezh, o tiskejañ eskern, kigennoù ha gwazhied (sl. *angine phlegmoneuse, cellulite diffuse, érysipèle, para-mastite, paramérite*).

phlegmoneux ◇ **phlegmonous** ◇ **1 morferek aa. 2 morferel aa.** 1 Gant ar morfer, sk. : *gorank morferek*. 2 A-zave d'ar morfer, sk. : *anaez morferel*.

phlogogène ◇ **phlogogenous, phlogogenic** ◇ **foüs aa., foeiat aa.** O tec'han tanijenn.

phlyctène ◇ **phlyctene** ◇ **fibloc'henn b.** Hogennad liñvenn sklaer o furmiñ ur glogorenn pe ur c'hwezigenn dindan an ezkroc'hen.

(-)phobie ◇ **(-)phobia** ◇ **1 (-)arur g. 2 -kaz g.** 1 (Termen arveret pe distag, pe evel lostrann) strafuilh bred, amgren enkreuz ha disol rak tud 'zo, traoù 'zo, kealioù 'zo, realoù 'zo, plegennoù 'zo, sk. : ar *foranarur* (sl. *agoraphobie*). 2 Erwezh pellaat diouzh un danvez pe un anadenn en askont d'un anaez organel, sk. : al *luc'hgaz* (sl. *photophobie*), azon an *erc'htrell* (sl. *cécité des neiges*) (sl. GBLF §802).

(-)phobique ◇ **(-)phobic** ◇ **1 (-)arurek aa., aruridik aa. 2 (-)arureg g. -eion 3 ~(-)arur, (-)arurel g.** 1 Gant un arur, techet d'an arurioù, sk. : *plegenn arurek, neuzid aruridik*. 2 Gouzviad un ()arur, sk. : *klozarureg, foranarureg*. 3 A-zave d'un arur, sk. : *ergerc'henn arur, neuroz arurel* (sl. GBLF §§ 802, 915, 916).

phobogène ◇ **phobogenic, phobogenous** ◇ **arureiat g.** En araez da zec'han arurioù (sl. GBLF § 916).

(-)phob(-)

• *aérophobie* avelgaz • *agoraphobie* foranarur • *algophobie* laurgaz; laurarur • *cancé-rophobie* kankrarur • *chromophile, chromophobe (physique)* livlen, livlez • *chromo-phobie* livarur • *claustrophobie* klozarur • *cremnophobie* neinarur • *dysmorphophobie* mineuzarur • *érotophobie* ruziadarur • *érythrophobie* ruzarur • *graphophobie* skrivarur • *héliophobie* heolarur; heolgaz • *hématophobie, hémophobie* gwadarur • *hydrophile, hydrophobe (physique)* dourlen, dourlez • *hydrophilie, hydrophobie (physique)* dourlended, dourlezded • *hydrophobie* dourarur; dourgaz • *hypophobie* olaon • *logophobie* komzarur • *nécrophobie* kelanarur • *névrose phobique* neuroz arurel • *nosophobie* klañvarur • *photophobie* luc'hgaz.

pholcodine ◇ **pholcodine** ◇ **folkodin g.** Deverad eus ar morfin, diounezet evit distav ar paz (sl. *codéine*).

phonation ◇ **phonation** ◇ **mouezhparañ** Teskad ar parennoù bevedourel ha nervvevedourel o kendaoliñ da barañ sonioù al lavar komzet : argrezerezh ar c'higennoù analadel, froumerezhezh plegoù ar vouezh, dassonerezh er c'havennoù us-garloc'henn : gargadenn, genoù ha fri, reizhiad nerval o kenurzhiañ an arc'hwelerezh (sl. *bégaiement*, La-17 170-177).

phoniatric ◇ **phoniatrics** ◇ **mouezhvezekniezh b.** Rann eus ar vezekniezh o plediñ gant anaezioù ar mouezhparañ ha strafuihoù ar c'homz.

phonocardiogramme ◇ **phonocardiogram** ◇ **kalonstenwezad g., stendresenn b. ar galon, kalonstendresenn b.** Tresenn dewerc'het dre lerc'hwezañ trouzoù ar galon.

phonocardiographie ◇ **phonocardiography** ◇ **kalonstenwezañ** Lerc'hwezañ kevregat trouzoù ar galon.

phonomécanogramme ◇ **phonomecanogram** ◇ **stendrelloc'hwezad g.** Lerc'hwezañ kevregat diaser stendresenn hag tredloc'hdesenn ar galon.

phonophonie ◇ **phonophobia** ◇ **1 stengaz 2 stenarur g., sonarur g.** 1 Aon kleñvedel rak an trouzoù kreñv en askont da gizidigezh nerval ar gouzrec'h (azon kreudel). 2 Amgren enkreuz rak stenioù pe sonioù 'zo en askont d'an eulad stag outo e diemouez ar gouzrec'h (azon bredel).

NOTENN : Pell emañ ar c'henglev a ren etre an aozerion. A-du int dre vras evit nesaat ar *stengaz* d'an *usklev* ha d'ar *stenuc'hanglev* (sl. *hyperacousie*); diegus e hañvalont bezañ avat d'ober un arur eus degouezhioù 'zo a *p.*

phoromètre ◇ **phorometer** ◇ **forometr g.** Ardivink amkanet da zinoiñ ha da vuzuliañ ar gouwilc'hañ (sl. *hétérophorie*).

phosphagène ◇ **phosphagen** ◇ **fosfagen g.** Kreatin fosforilek, furm gadaviñ ar gremm er c'haer.

phosphatase ◇ **phosphatase** ◇ **fosfataz g.** 1 Enzim gougevret ouzh stroll an hidrolazioù (sl. *hydrolase*), o tilaoskiñ fosfatoù anvevel andileizh dre zourannañ ar fosfatoù bevel; bezant eo en darn vuiañ eus ar gwiadoù, met dreist holl en eskern : dasperzhiañ a ra e meineladur an atel; ar *f. alkaliek* (eleze en araez da werediñ er meteier alkaliek, a pH etre 8,6 ha 9,1), uheloc'h e wadvec'h en oadvezh ar c'hreskiñ hag e-kerz kleñvedoù an avu hag an eskern : lec'h, askomvlodad, arskoedusvorc'h, kleñved Paget, hiperostoz enaskornel, kankr eilvedel an eskern, kankr an avu; ar *f. trenkek* raksavennel, PAP (o werediñ er metoù trenkek, a pH etre 5 ha 5,6), usvec'hiek e-kerz kankr ar raksavenn (sl. *anti-gène prostatique spécifique, marqueurs tumoraux*). 2 Enzim borc'het gant glourgenn ar pervez o werediñ war an nukleotidoù dilaosket gant ar polinukleotidaz dre o ec'haozañ etre trenkenn fosforek ha nukleotidoù (sl. *nucléotide*).

phosphatasémie ◇ **fosfataemia** ◇ **gwadvec'h fosfataz** Feur ar fosfataz er gwad.

phosphatémie ◇ **phosphataemia** ◇ **gwadvec'h g. fosfatoù, fosfatwadvec'h** Feur ar fosfatoù er gwad, dewerzhet dre milimoloù (mmol) fosfor.

phosphaturie ◇ **phosphaturia** ◇ **troazhvec'h g. fosfatoù, fosfattroazhvec'h** Feur ar fosfatoù ezvevnet dre an troazh; reol etre 22 ha 42 mmol (etre 680 mg ha 1300 mg) dre 24 h.

phosphène, photopsie ◇ **phosphene** ◇ **gleurinell b.** Luc'heraezadenn a zo he orin er-maez er benvegad gweled (sl. *entoptique*), oc'h anadiñ ent emdarzh (sl. *migraine ophthalmique*) pe e dianlen un daraez, un amwask a 'l lagad pe un tredanfraouat a 'l luc'hsae.

- phosphodiésterase** ◇ **phosphodiesterase** ◇ **fosfodiésteraz** g. Enzim o treluskañ dourranñ an drenkenn adenosin monofosforek korvellek (Gl. *acide monophosphorique cyclique*, AMPc) en AMP ankorvellek; heudet e vez gant an teofillin ha kalonusreerion 'zo.
- phospholipide** ◇ **phospholipid** ◇ **fosfolipid** Anvad genadel an triglikéridoù esteret unan eus o soazioù alkoool gant an drenkenn fosforek; parzhiat emaint er c'hoc'hennou; ar *f.* a 'r gwad (feur reol etre 2,45 ha 3,10 mmol/l gant an oadour) a gaver e-barzh molekul kemplezh al lipoproteinou, ar β -lipoproteinou pergen ha muic'h c'hoazh an α -lipoproteinou (sl. *lipides*, *lipoprotéine*).
- phosphoprotéine** ◇ **phosphoprotein** ◇ **fosfoprotein** g. Seurtad protein kemplezh (sl. *hétéroprotéine*) o tisoc'h eus uniadur ur protein gant un danvezenn fosforin, bezant er vioù hag e kazein al laezh.
- phosphore** ◇ **phosphorus** ◇ **fosfor** g. Elfenn gimiek, arouez P, a niverenn atom 15, kedius kenan; bezant er bevedeg a gementadoù bihan e rezh fosfatoù meinel; e-barzh korf an den e vez etro 700 mg, 75 % anezho kadavet en eskern hag en dent e-barzh ur fosfat kalkiom nes d'an *hidroksiapatit* a zelun $\text{Ca}_5(\text{PO}_4)_3(\text{OH})$; parzhiat emañ ar peurrest e molekul bevel angorzhet gant kennevidoù niverus ec'haskornel : enzimou evel an adenosin trifosfataz pe molekul kevreet ouzh an trenkennoù nukleek hag al lipid; e-keñver lezenn ez eo ar pistriadur dre ar *p.* ur c'hleñved micherel (taolenn niv. 5).
- phosphorémie** ◇ **phosphoraemia** ◇ **gwadvec'h g. foskor, fosforwadvec'h** Feur ar fosfor e plasma ar gwad; gavalet emañ ar *g. f.* etre 35 ha 40 mg/l (1 hag 1,5 mmol/l) gant an oadourion, etre 40 ha 55 mg/l (1,5 ha 2,0 mmol/l) gant ar vugale.
- phosphorescence** ◇ **phosphorescence** ◇ **astreluc'hañ** Treluc'hañ stadet pa gendalc'h atom da ec'hodiñ luc'h dre ziargridañ goude bezañ bet argridet en ur stad manstabil dindan wered ur gremm (luc'h, gwrez) (sl. *luminescence*).
- phosphoride** ◇ **phosphoride** ◇ **fosforid** g. Anaf, kuñv peuliesañ, a stader war groc'hen ar vicherourion o tornata ar fosfor.
- phosphorisme** ◇ **phosphorism** ◇ **fosforegezh** b. Pistriadur dre ar fosfor; ar *f. lemm*, diwar euvriñ foskor, o c'hoarvezout a strafuilhoù koazhadel : heugennoù, c'hweladoù, darc'hoal gant tangrez, skorted avu, o tedreiñ d'ar marv herrek pe herrekoc'h hervez ar c'hementad euvret; ar *f. henek*, kleñved micherel, o tevoudañ asiked, dic'halloud ganadel ha dreist holl darvoudoù e par ar munsunou hag an dent o vont a-wechoù betek *marvenn fosforel* an divaven.
- phot** ◇ **phot** ◇ **fot** g. Unanenn goulaouder (Gl. *éclairage*, MT^{-3}), arouez *ph*, despizet evel goulaouder ur gorread 1 cm^2 dindan ul luc'hgas (Gl. *flux lumineux*, ML^2T^{-3}) 1 lumen; unanenn dilezet hiziv e gounid al luks (1 $ph = 10^4 lx$) (sl. *éclairage* (*lumineux*)).
- photoablation cornéenne** ◇ **corneal photoablation** ◇ **luc'hezenañ ar gornsae** Kalvezder surjaniel gwezhiat ouzh an isstiwel, anezhañ leiaat krommder ar gornsae dre araez un hordenn laser (sl. *laser*) arloet ouzh gorre ar gornsae (sl. *lasek*), pe ouzh ar stroma anezhi (sl. *lasik*) goude didroc'hañ surjaniel ur pann bas anezhi.
- photoallergie** ◇ **photoallergy** ◇ **luc'hallergiezh** b. Erwezh kroc'hen ezreol dibad ouzh skinoù an heol (sl. *héliodermite*, *photo-sensibilisation*).
- photoathérolyse** ◇ **photoatherolysis** ◇ **luc'hloezañ an aterom, ateromluc'hloezañ** Distruij ar plakennoù aterom dre araez ur skin laser ec'hodet gant ur sont ebarzhet en dalmerenn (sl. *athérectomie*, *athérome*).
- photobiologie** ◇ **photobiology** ◇ **luc'hvevoniezh** b. Studi delanvad al luc'h, gouloù an heol pergen (heoliadennoù), hag ar skinoù dreistmouk war ar bevedeg en e bezh ha war arc'hwelerezh ar benvegadoù anezhañ.
- photochimiothérapie, thérapie photodynamique** ◇ **photodynamic therapy** ◇ **kimigurañ luc'hvlivadel** Araezad yac'h-adel o tanveziñ un aozad kimiek blivaet gant skinadoù tredanwarellek.
- photocoagulation** ◇ **photocoagulation** ◇ **luc'hgaouediñ** Korvoñ gremm ur skinad luc'h strizh (lamp dre ksenon, laser) evit prederiañ anafoù e par ar benvegad koazhañ, ar benvegad anañ pe al lagad; en dromañ diwezhañ e tec'haner un erwezh foel en dolgennsae a ra dezhi glenañ ouzh al luc'h sae (mod kurañ rogad al luc'h sae, pe ergurañ diflosk al luc'h sae).
- photodermatose, photodermite** ◇ **photodermatitis** ◇ **luc'hgroc'henfo** g. Kroc'henadoù diseurt (eritem, prurigo, linadell) e dianlen dreistkizidigezh ar c'hroc'hen ouzh al luc'h.
- photogène** ◇ **photogenic** ◇ **luc'heiat** aa. O c'henel luc'h.
- photogénique** ◇ **photogenic** ◇ **luc'hien** aa. A-zivout un darvoud bevedel delanket gant al luc'h (sl. *épilepsie réflexe*).
- photomètre** ◇ **photometer** ◇ **luc'hventer** g. -ioù, **fotometr** g. Ardivink muzuliañ al luc'hskinread.
- photométrie** ◇ **photometry** ◇ **luc'hventerezh** g. Muzulierezh al luc'hskinread hag ar mentennoù kerentiet dezhañ (luc'hgas, sked, goulaouder).
- photophérèse** ◇ **photopheresis** ◇ **edrannluc'hañ** Kalvezder yac'hadel, anezhañ diounit un danvezenn luc'hoberiek d'ar gouziviad ha, da c'houde, diroudañ red ar gwad dre un amdreug ezkorfel skinataet gant luc'h dreistmouk.
- photophobie** ◇ **photophobia** ◇ **1 luc'hgaz** g. **2 luc'harur** g. 1 Ersav hepkoriñ ar gouloù a stader gant gouziviaded ar pilhonfo hag anaezioù 'zo a 'n daoulagad. 2 Amgren neurozek rak ar gouloù.
- photopique** : **vision** ~ ◇ **photopic vision** ◇ **gweled pe fotopek** Eraezusted al luc'h sae, a-geñver gant ar gweled deiz, eleze dreist da 10 nit sked (sl. *mésopique*, *scotopique*).
- photopléthysmographie** ◇ **photoplethysmography** ◇ **fotopletismografiñ** Araezad amkanet da andalañ gwazhiedadur ar c'hroc'hen : paket e vez gant ul luc'hgell ur skin disvannet gant gorre an amwiskadoù; hentenn ergemennet evit andalañ hag erdebiñ ar strafuilhoù teñvel.

photopodogramme ◇ **photopodogram** ◇ **solluner, fotopodogramm** g. Louc'had sol an troad dewerc'het dre ober d'ar gouziviad mont en e sav pe bale war un trevnad lerc'hwezañ.

photorécepteur ◇ **photoreceptor** ◇ **luc'hfraouva** g. Elfenn nervskiantennel fraouaet gant al luc'h, da skouer *kegel* pe *hinkin al luc'hsae* (sl. *bâtonnet rétinien, cône rétinien*).

photosensibilisation ◇ **photosensitization** ◇ **luc'hgizidiktet** Stad un amwiskad erwezhusaet ouzh skinoù an heol da heul diounezadur diavaez pe diabarzh gwezhierioù luc'hgizidikaat (porfirineier, deveradoù koumarinek, sulfamidoù, kiklinoù, deveradoù aromatek, h.a.); daou vod erwezhañ ouzh an heol a zisparter : pe an erwezhiou luc'hbistriel hogozeq, foel, unneuz, pe an erwezhiou luc'hallergek eilvedel, liesneuz.

photothérapie ◇ **phototherapy** ◇ **luc'hgurañ** Hentenn yac'hadel o tanveziñ gwered ar gouloù gwenn pe livek, ar skinoù danruz ha dreistmouk, al laser (sl. *photocoagulation, photochimiothérapie*).

phototomie ◇ **phototomy** ◇ **laservenañ** Ober gant ar skinoù laser evit skejañ ur gwriad.

phototraumatisme ◇ **phototraumatism** ◇ **luc'hzaraez** Gwered gloazus al luc'h.

phototropisme ◇ **phototropism** ◇ **luc'hgerc'hañ, luc'hgerc'h** g. Delanvad al luc'h war vevion 'zo (plant pergen), ouzh o lakaat, hep dilec'hiañ, da dreñ ouzh (*l. yaek, Gl. p. positif*) pe da zistreiñ diouzh (*l. nac'hek, Gl. p. négatif*) mammenn al luc'h.

phrénicectomie, phrénicotomie ◇ **phrenicectomy** ◇ **meginzevenañ, meginenbenañ** Skejañ gant pe hep amnaziñ unan eus an div nervenn a 'r vegin, o trovadañ seizi hag askennad kouc'hell geñverek ar gelc'hspourenn, hentenn c'houstougurañ arveret gwechall da brederiañ an anaeziou bronkezskventel henek (sl. *collapseothérapie*).

phrénique ◇ **phrenic** ◇ **1 ~kelc'hspourenn, kelc'hspourennel** aa. **2 ~megin, meginel** aa. 1 A-zave d'ar *gigenn gelc'hspourenn* (TA *musculus diaphragma*). 2 A-zave da *nervenn ar vegin* (TA *nervus phrenicus*).

phrénique : phénomène du ~ ◇ **phrenic phenomenon** ◇ **anadenn b. ar gelc'hspourenn** Arouez a stader en dedaniezh, anezhi stroñsoù korvezek en hanterenn gleiz ar gelc'hspourenn, goubred da sistoloù ar galon hep bezañ kempreded gant tosoù ar gern, a zispleger dre hegadur nervenn gleiz ar vegin gant loc'hadou ar galon pe gwared an aortenn.

phrénique : signe du ~ ◇ **phrenic pressure point** ◇ **arouez b. ar vegin** Laur ouzh ar pouezañ war un nervenn a 'r vegin en he foent tremen etre ar c'higennoù skueliek, stadet en anaeziou diseurt : bestlgellennfo, divilhennfo, lestrlounezhfo lemm ha darvoudoù grezvarrek ar c'hrouanegezh lounezh.

phrénite ◇ **phrentitis** ◇ **kelc'hspourennfo** g. Tanijenn ar gelc'hspourenn.

phrénoplastie ◇ **phrenoplasty** ◇ **kouc'hellatelviñ** Oberatadenn amkanet da zazluniañ ur gouc'hell gelc'hspourenn toroget.

NOTENN : Arverioù an daouad kedrannoù Br. *-kelc'hspourenn-* / *-megin-* ne genglottont ket bep tro gant arverioù an daouad Gl. *diaphragmat-* / *-phrén-*.

phrynodermie ◇ **phrynoderma** ◇ **frinoderma** g. Dispuilhad krugenoù kornin bolc'hennek e-kerz an anvitaminegezh A.

phtiriase, pédiculose inguinale ◇ **phtiriasis, pediculosis pubis** ◇ **laouegezh b. kaezourel, laouigenn b.** Amarvevad-egezh debronek o tizhout ar c'horf a-bezh pe a-zarn dec'hanet gant unan eus an tri spesad laou, *Phtirus inguinalis* pe *P. pubis* (Br. *laou pafalek pe faraon, Gl. pou de pubis, mormions, Sz. pubic lice, crabs*), rouestlet alies gant anafoù skrapañ dreistporeet pe ekzimatekaet hag a-wechoù ul livegad glas-sklient (sl. *pédiculaire, pédiculose, pou*).

phtisie ◇ **phtthisis** ◇ **ftiziz** g. Termen bet arveret er vezekniezh, da gentañ en ur ser gant Gl. *consumption*, da arouezañ an treutaat argammedek oc'h echuiñ gant ar marv en darn vuiañ eus ar c'hleñvedoù henek, en dorzhellegezh pergen, deuet, er 17^t kantved, da arouezañ an dorzhellegezh skevent nemetken; kavet c'hoazh en 20^t kantved e degouezhiou dibaot kenan evel Gl. *phtisiologie*, arbennigiezh a blede gant torzhellegezh ar skevent, steuziet hiziv goude un dreistbevadur berrbad er furn *pneumophtisiologie*; menegomp ivez termenoù evel Gl. *phtisie du globe*, (hiziv *ophthalmomalacie*), ha deveradoù all diwar ar gedrann *-phtis-* : *myélophthisie, panmyélophthisie, néphrophthisie, néphronophtise*, h.a. (sl. *myé-lose aplasique, néphronophtisie héréditaire de l'enfant*).

phycomycose ◇ **phycomycosis** ◇ **fikomikoz** g. Anvad stroll ar c'hleñvedoù trovanel diwar ar fikomiket, foue izelañ.

phylaxie ◇ **phylaxis** ◇ **ergost** g. Galloud mezifenn a-berzh ar bevedeg ouzh ar porañ, oc'h erdalañ ar fagokitoz hag ar furniñ antikorfoù (sl. *aphylaxie, tachyphylaxie*).

phyllode, tumeur phyllode ◇ **phyllode** ◇ **fillod** g. Seurtad pe lankad dedreñ neuziadurel eus adenosarkom ar vronn.

phylogénèse, phylogénie ◇ **phylogeny** ◇ **hildarzh** g. Diorreadur ar spesad a-gevenep da ziorreadur an hinienn pe *unandarzh* (sl. *ontogénèse*), (sl. *évolution, Haeckel : loi de ~, loi biogénétique*).

physicodépendance ◇ **physical dependance** ◇ **kreudestoue** g. Stad kempouez kreudel nevez e-keñver an dramm diraezet evit ur gwel gant ar c'haezhiad, anezhi ur rank silwink, bepred e tro da derrañ ha da lezel al lec'h gant gwaskad an dizonañ hag ar stad ezeved (sl. *besoin, manque : état de ~, dépendance, psychodépendance, toxicomanie*).

physiogène ◇ **physiogenic** ◇ **kreudien** aa. A zo e orin en arc'hwel an organoù, a-gevenep da *bredien* (sl. : *psychogène*).

physiognomonie ◇ **physiognomony** ◇ **enebrezhouriezh** Studi keñverioù an neuzid ouzh an enebrezh ha neuziadur ar penn.

physiologie ◇ **physiology** ◇ **1 bevedelezh b. 2 bevedouriezh b. 3 kreudadur** g. 1 Hollad ar perzhioù piaouel d'ar beved, sk. : *neuziadurezh ha bevedelezh an nerveg* (Gl. *morphologie et physiologie du système nerveux*). 2 Rann eus ar vevoniezh o

studiañ perzhioù hag arc'hweelioù organoù ha gwiadoù ar bevion; *b. kelligel* (Gl. *p. cellulaire*), studi anadennoù ar beved ebarzh ar gellig; *b. hollek* (Gl. *p. générale*), studi anadennoù ar beved boutin etre an holl spesadoù loenel ha struzhel. 3 Aoz ar vevedelezh gant un hinienn pe ur stroll hiniennoù hervez an amveziadoù, sk. : *k. an Eskimoed* (sl. *psycho-logie* 3).

physiologie pathologique, physiopathologie, pathophysiologie ◇ **physiopathology, pathophysiologie** ◇ **bevedouriezh b. kleñvedel, klañvvevedouriezh b.** Studi arc'hweelioù ar bevedeg pe arc'hwelerezh un organ pa vezont darllet gant ar c'hleñved.

NOTENN : Kemm erdal ez eus etre an termenoù gallek ha saoznek : talvout a ra Sz. *p.* evit an holl vevedegoù, ken yac'h, ken klañv, tra ma pled Gl. *p.* gant an arc'hweelioù reol nemetken; alese arver Gl. *physiologique* gant ar ster "bonan" hag ar gourzheb a zo gant ar c'herienn Gl. *physiologie pathologique*.

physiologique ◇ **physiological** ◇ **1 bevedel aa. 2 bevedourel aa. 3 reol g., bonan aa.** 1 Piaouel d'ar beved. 2 A-zave d'ar vevedouriezh. 3 sl. *normal* 2.

physiopathiques : troubles ~, syndrome de Babinski-Froment, troubles ou contractures réflexes ◇ **physiopathic disorders** ◇ **strafuilhoù ledvredel pe fiziopatek, azoniaù Babinski-Froment, dargrezaoù l. (g.) damougek** Erzerc'hadoù kleñvedel diandaraez (andrafted, dargrezañ, strafuilhoù teñvel ha gwazhiedloc'hadel) dreist keñver gant an darvoud dec'hanger; o displegañ a reer dre c'houlakaat un dasperzhiadur bredel.

physiopathologique, pathophysiologique ◇ **physiopathological, pathophysiological** ◇ **klañvvevedourel aa.** A-zave d'ar vevedouriezh kleñvedel.

physiothérapie ◇ **physical therapy** ◇ **alvezkurañ, yac'hadur g. alvezel** Prederiadur dre ar gwezherioù alvezel, naturel pe kalvezadel (dour, aer, tredan, luc'h, skinoù X, korfoù skinoberiek, yenion, gwrez, hag ivez an hinadoù, an uhelder, ar c'herzhed, ar gimnastik) (sl. *climatologie, masso-kinésithérapie* NOTENN, *médecine physique*).

(-)**physic-**, (-)**physio-**, (-)**physique**

- *activité physique* oberiezh korf • *appliquer (physiquement)* stafañ • *automatisme (physiologie)* diarzoug • *automatisme (physique)* emgeffen, emgrefreegezh • *bio-logique, organique, physiologique* bevedel • *biophysique* bevfizik • *capacités physi-ques et psychiques* gouestet kreudal ha bredel • *concept anatomophysiologique* meizad korfadurel-bevedourel • *constante physiologique* gwastadenn vevedel • *débilité physique* izilded • *dégradation physiologique* bevec'haozañ • *déséquilibre physiologique* ec'hwastad • *douleur physique* poan gorf, laur kreudel, gost • *électrophysiologie* tredanvevedouriezh ◇ *grandeur (physique)* mentad • *inertie physique* anniñv korfel • *intensité (physique)* read • *influence (physique, physio-logique)* delanvad • *jeu de physionomie, expression du visage* dremmvez • *(le) physique, soma* kreud • *loi (physique)* saveleñ • *métaphysique* trabedel • *négligence physique* amlez korfel • *physicochimique* fizikel-kimiek • *physiologique* bevedel, bevedourel • *réduction de l'activité physique* isniñv korfel • *psychophysiologique* bredvevedel • *physique, matériel* alvezel • *physique, organique, somatique* kreudel • *représenter (physiquement)* rezhienañ • *sens (physiologique)* skiantenn • *soluté physiologique* dileizhad kengrennek • *son (physique)* sten • *système physiologique* reizhiad vevedel • *système physique* reizhiad pe trevnad fizikel pe alvezel • *violence physique* feulster korfel.

phytanémie ◇ **phytanemia** ◇ **gwadfitanegezh b.** Bezañs trenkenn fitanek er gwad (sl. *Refsum : maladie de ~*).

phytate ◇ **phytate** ◇ **fitat g.** Hal an drenkenn fitek en araez da gediañ er pervez gant ar c'halkiom ha da skoilhañ ouzh ar sugadur anezhañ.

phytobozard ◇ **phytobozoar** ◇ **fitobozoar g. -où** Korf estren e-barzh ar stomok, ouzh e ober drailhennoù struzh e dilerc'h ar boued (sl. *bezoard*).

phytohémagglutinine ◇ **phytohaemagglutinine** ◇ **fitohemagglutinin g.** Mukoprotein douhennet eus greun ar fav ruz (*Phaseolus vulgaris*) en araez da zazgludañ an hemati ha da zec'han neridigezh al limfokit bihan tiñvet *in vitro* hag an dreuzfurmidigezh anezho e kelligoù blastel bras leteñvel ouzh ar c'helligoù hangaoc'hougonek pe immunoblast, erwez hemañ anvet *prouad dre ar f.* a zewerc'her dre ensinklañ *f.* en derm; yaek eo pa vez reol an hangae kelligel, nac'hek pa ra diouer an hangae hag an dreistkizidigezh daleet ha, da heul, pa na c'hoarvez kemm ebet gant al limfokit (sl. *cellules immunocompétentes, hypersensibilité 2, immunité, immunoblastes, intra-dermoréaction, lectine, lymphocytes : transformation des ~ in vitro*).

phytoparasite ◇ **phytoparasite** ◇ **plantarvevad g.** Arvevad gougevret ouzh ar riezad plantel.

NOTENN : Kinnig a ran derc'hel arver **1)** *struzh(-)* er par hollekañ (*struzh trovanel*, Gl. *végétation tropicale*; *struzhad*, Gl. *produit végétal*; *reizhiad nervstruzhel*, Gl. *système neurovégétatif*), **2)** *plant(-)* e par ar bevedegoù (*riezad plantel*, Gl. *règne végétal*), **3)** *luv(-)* ent dibarek evit ar plant danvezet er boueta hag er mezegañ (*luvezat*, Gl. *phytophage*; *luvouezh*, Gl. *mucilage*).

phytopathologie ◇ **phytopathology** ◇ **plantkleñvedouriezh b.** Diskiblezh o plediñ gant kleñvedoù ar plant.

phytophotodermatite ◇ **phytophotodermatitis** ◇ **plantluc'hgroc'henfo g.** Anaez kroc'hen naous dre un dispuilhad eritemgloevnennel delantek gant ardizh an heol hag ar glebor e diastok ar plant; ar seurtad anavezetañ eo kleñved Oppenheim (sl. *Oppenheim : maladie d'~*).

phytosterol ◇ **phytosterol** ◇ **fitosterol g.** Anvad genadel ar steroloù a orin struzhel evel an ergosterol.

phytothérapie ◇ **phytotherapy, herbal treatment** ◇ **luvezegañ, luvgurañ** Prederiañ dre araez ar plant.

pian, yaws, frambœsia ◇ **yaws, framboesia, pian** ◇ **pian g., framboesia g.** Poread tredizhus, broreuziat e rannbarzhioù trovanel koadek Afrika, Azia hag Okeania, a zo e wezher an *Treponema pertenué*, nes d'an *Treponema pallidum*, gwezher ar

sifiliz, treuzkaset dre ziaostokou etredenel angwenerel; hervez rummadur ABY (*Amaezh Bed ar Yec'hed*), e teskriver *a*) un *anaf derou* (Sz. *initial lesion*), o trediñ e-doug lies miz, e rezh ur *pianom*, koeñvenn c'hreunek a neuz gant ur flamboezenn, pe ul livant ledanoc'h eget hini ar sifiliz ha hep diaz argalet, a-gevret gant terzhienn ha lauriou en izili, *b*) ar *pian kroc'henel kentrat* (Sz. *cutaneous lesion at the primary stage*), naous dre an dinod eus *pianidoù* hag eus *pianomou* da heul ur rozig, *c*) ar *pian goulerc'hat* (Sz. *cutaneous lesion at the secondary stage*), naous dre anafoù ar c'hroc'hen (gomou, gouliezoù, hiperkeratoz palv-sol) hag an eskern (amaskornennfo usteñvus ha disneuzius, spina valgosa pe ventosa, boomerang legs); e kemm ouzh ar sifiliz ne vez ket tizhadoù nerval na kalongwazhiedel; e derou ar bloavezhioù 1950 edo tizhet gant ar pian ur 60 milion a dud dre ar bed; da heul ar c'houlzad yoc'hek renet gant an ABY etre 1950 ha 1967 e voe koulz lavarout ezvoudet ar c'hleñved (a-walc'h ez eus gant ur sankadenn enkaherel benzatin benzipenikillin evit lakaat harz d'an dedro anezhañ) (sl. *Organisation mondiale de la Santé, pianide, pianome, roséole, syphilis, Treponema*).

pian-bois, bouton de Bahia ◇ **American leishmaniosis, Bahia ulcer, uta, bush yaws** ◇ **leichmanioz amerikan, porbolenn b. Bahia, pian ar strouezh** Anaev boutin e rannbarzh koadek Gwiana, diforc'h diouzh ar pian, naous dre goeñvennoù hevonn en dro d'un angreizh kraterek, c'hwarrennoù keñverek ha daralladur don pe donoc'h a 'r stad hollek, kiriek dezhañ *Leishmania brasiliensis* trezouget gant ar flebotom.

pianide, framboésid ◇ **cutaneous yaw at the secondary stage** ◇ **pianid g., framboezid g.** Anaf kroc'hen a 'r pian o tarvezout un nebeut sizhunvezhioù goude al livant, sec'h, keratozek, gwalennek alies, a-strew, o steuziañ ent emdarzh.

pianome, framboésiome ◇ **framboesioma** ◇ **pianom g., framboeziom g.** Anaf kroc'hen a 'r pian eilvedel, arrott, balirek, ouzh e ober un tolpad struzhennoù gleborek ha gwadek, warno un drouskenn a liv gell, o steuziañ a-benn mizvezhioù pe bloavezhioù ha lezel ur gleizenn livegat war e lerc'h.

pianotement, pianotage ◇ **strumming** ◇ **biziata** Kalvezder merata, anezhañ skeiñ gant beg ar bizied war ur parzh korf en doare ma pouezer war stokelloù ur c'hlavier (sl. La-18 232).

pic ◇ **spike, peak** ◇ **1 pik g. 2 bomm g., renn g., uc'hat aa., uc'had g.** 1 Dilive trumm ha berrbad a stumm gant ur spilhenn, stadet en ur c'hevregad (barrwezad, tredanfraouad, tredannizhwezad, stenwread, h.a.) (sl. *électro-stimulus, monoclonal, pointe, pointe-onde*). 2 Muiad trumm un argerzh bevedel, sk. : *bomm eleozinofil* (Gl. *pic éosinophilique*), *renn kreskiñ ar gaezouregzh* (Gl. *p. de croissance pubertaire*), *borc'hadur uc'hat* (Gl. *p. de sécrétion*).

pica ◇ **pica** ◇ **pika g.** Troziadezh an avez, anezhi an tued da zebriñ danvezhennoù anhezebr.

Pick : **maladie de ~** ◇ **Pick dementia or disease** ◇ **kleñved Pick** Seurtad envedi gentrat naous *ent neuziadurel* dre isteñv bloc'hel an empenn, muiek en tolbezhennoù tal hag ividig, *ent klinikel* dre zisleberadur an arc'hwelioù kefredel, un ankomez a rizh anenluzel, an andalc'h hag un dedro herrek d'ar fallezh ha d'ar marv; kleñved ma ve reñverek ar zink er gwiad nerval, renket etre an dic'henezhadurioù a-hêrezh (sl. *Alzheimer* : *maladie d'~, démence, démence frontotemporale, détérioration mentale, gâteux, Mesulam* : *syndrome de ~*).

Pick : **signe de ~** ◇ **arouez Pick** Darwazh ar c'hevresaeoù en tachad hewel etre ar malvennoù e-kerz an derzhienn ouzh *pappataci* (sl. *fièvre à pappataci*).

Pickwick : **syndrome de ~** ◇ **Pickwickian syndrome** ◇ **azoniad Pickwick** Azoniad anvet diwar an dudenn handerc'h het gant Dickens, naous dre ur borrdor muiek, un iswentadur skevent gant oloksigen ha karboüsvec'h, o tec'han dulaz hag elruz, o vont betek ar falladur kalon dehou; azon pennañ eo strafuilhoù ar c'housked : barroù morvor deizel, kousked noz dihabask, dastroc'het gant dihunou ha harzanalou marvus a-wechoù.

pico- ◇ **pico-** ◇ **piko-** (arouez p) rakger o tenaouiñ 10^{-12} .

Picornaviridæ, Picornaviridés ◇ **Picornaviridae** ◇ **Picornaviridae, Pikornavirideged l. (g.)** Kerentiad viruzoù gant DNA undigorvell, a vent vihan (etre 18 ha 30 nm), dezho ur c'hapsid a gemparzhgezh diñsek, gant 32 gapsomer, hep golo, gougevret outañ ar genadoù *Enterovirus, Heparnavirus* (pe *Hepatovirus*), *Parechovirus, Rhinovirus, Aphotavirus ha Cardiovirus*, ar re-mañ diwezhañ o poreañ a-getep ar chatal hag ar c'hrignerion.

pia-mère, TA pia mater ◇ **pia mater** ◇ **pilhonnenn b. danav** Lienenn fin gwazhiedet arloet ouzh gorre an nerveg (sl. *méninges*).

piebaldisme ◇ **piebaldism** ◇ **piebaldegezh b.** Kammneuziad hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hok, anezhi un albinegezh darnel naous dre gevredadur ur gizennad vlev gwenn hag un islivegad a-gof (tal, gwriazienn ar fri, talbenn araok ar c'hef) (sl. *albinisme, vitiligo*).

pied, TA pes ◇ **foot** ◇ **troad g.** Parzh pellek an ezel traoñ, ouzh e ober 26 askorn, 16 kenvell, 107 stagell hag 20 kigenn, ereet ouzh ar c'har dre ar *c'henvell fer-gar* pe *kenvell an ufern* (TA *articulatio talocruralis*); un deskrivadur a-c'horre a zisparti un talbenn uhelañ pe *kil* (Gl. *dos*), rann adreñv ar c'hil o vezañ ar *choug* (Gl. *cou-de-pied*), hag un talbenn izelañ pe *sol* (TA *planta pedis*, Gl. *plante du pied*, Sz. *sole of the foot*), rann adreñv ar sol o vezañ ar *seul* (TA *calx*, Gl. *talon*, Sz. *heel*); an deskrivadur a-zon a ra anv eus ar *raog troad* (Gl. *avant-pied*), da atel dezhañ eskern ar *c'hreiztroad* (TA *metatarsus*, Gl. *metatarses*) hag an *oënsou* (TA, Gl., Sz. *phalanges*), hag eus an *treñv troad* (Gl. *arrière-pied*), ennañ daou eus eskern ar *souk* (TA, Sz. *tarsus*, Gl. *tarse*): an *askorn fer* (TA Sz. *talus*, Gl. *astragale*) hag an *askorn seul* (TA Sz. *calcaneus*, Gl. *calcaneum*); araez eo an troad d'an dilec'hiañ, perzh en deus er c'hempouez (sl. *équilibre 2*) hag en erluskañ; warnañ e pouez tolz ar c'horf (sl. *metatarses, tarse*).

pie bot ◇ **talipes, clubfoot** ◇ **troad potin** Distummadur padek a 'n troad, ganedigel pe arzeuat, o virout outañ a bouezañ war al leur dre ar poentoù harpañ reol; pevar seurtad *t. p.* a ziforc'her hervez tu ar gammadet: 1) an *t. p. rakkamm* (Gl. *p. b. équín, Sz. t. equinus*), pa vez an troad a-helc'h war astenn hag o pouezañ war al leur dre e veg; 2) an *t. p. drekkamm* (Gl. *p. b. talus, Sz. t. calcaneus*), an troad o vezañ ahelc'h war bleg hag o pouezañ dre e seul; 3) an *t. p. ezkamm* (Gl. *p. b. valgus, Sz. t. valgus*), an troad, gwariet war ziavaez o pouezañ dre e ribl diabarzh; 4) an *t. p. enkamm* (Gl. an *t. p. varus, Sz. t. varus*), troet e sol war ziabarzh, e ribl diavaez o pouezañ war al leur; alies e vez kevredet div gammadet, dreist holl ar rakkamm hag an enkamm (*t. p. enrakkamm*, Gl. *p. b. varus équín, Sz. t. equinovarus*) pe an drekkamm hag an ezkamm (*t. p. ezdrekkamm*, Gl. *p. b. talus valgus, Sz. t. talus valgus*) (sl. *équín, équínisme, talocrurale : articulation ~, valgus, varus*).

pie bot tabétique ◇ **tabetic talipes** ◇ **troad potin tabezel** Troad potin enrakkamm dianlen d'an ankedre hag an istant o tarvezout gant an dabezeion hirvanet war o gwele.

pie convexe congénital, pied en piolet ◇ **congenital convex pes valgus** ◇ **troad argeinek ezkamm ganedigel, troad pioledek** Seurtad troad potin heñvel ouzh an troad ezdrekkamm, ar raog troad o vezañ war bleg a-gein ha war bellaat, nemet emañ an askorn fer war astenn, ent rakkamm ouzh ar skin; digevret e vez a-wechoù ar gammneuziad-mañ; gwechoù all ez eo parzhiat en azoniad trazomek.

pie creux ◇ **pes cavus** ◇ **troad kleuz** Distummadur an troad o c'hoarvezout etre 8 ha 15 vloaz, naous dre leïad ar c'horn etre raog ha treñv troad e par ar c'henvell kreiz-souk ha, dre se, muiad argevegezh ar sol, bolzegezh ar c'hil, krabanegezh ar bizied troad hag a-wechoù ar rakkammadet (sl. *métatarse*).

pie d'athlète, épidermomycose du pied ◇ **athlete's foot, dermatophytosis interdigitalis** ◇ **troad kampour, dermatofitoz g. etre-bizied** Dermatomozikoz a 'n troad diwar seurtadoù foue 'zo (*Trichophyton, Epidermo-phyton, Ctenomyces pedis*), bet stadet gwechall er broezioù trovanel, boutin bremañ en Europa, dreist holl gant ar sportourion hag ar vilourion; o teraouiñ peurliesañ er 4e pleg etre-bizied, naous dre devadur kornhaen ar c'hroc'hen war dalbennoù kostezel ar bizied, en ervez da zredreñ e rezh skarrou, ruzder, gourc'hennoù, c'hwezigennoù hag erzerc'hadoù allergek.

pie d'immersion ◇ **immersion foot** ◇ **troad peñse** Azoniad a stader gant ar beñseidi da heul hirchomadenn o eizhaennoù en dour, naous dre laurioù, eritem eun pe kevret gant gouliñv, filboc'henoù ha bronduennoù.

pie de mine ◇ ◇ **troad min** Anafoù kemplezh en troad, dec'honet, en amzer vrezel, dre ur wered fuc'h lec'hiek, gant bloskad ur min douarel, anezho ur gouliñv gant kroc'hen marbret, persdu, goloet a-wechoù gant filboc'henoù, gloazadoù a r gwazhied, torroù liesel en eskem fer ha seul dreist holl (sl. *blast injury*).

pie en éventail ◇ **broad foot** ◇ **troad diskalfet** Toad ledan ha pladet da heul fontidigezh bolz ar c'hreiztroad (sl. *métatarse*).

pie forcé, fracture de fatigue ◇ **forced foot, Deutschlander disease** ◇ **troad trastennet, torr g. a-drastenn** Darvoud o tizhout ar soudarded yaouank dreist holl da heul ur c'houezh, un treuzkammed, un dreistkerzhadeg, azonet gant ur goeñvadenn war rann grenn kil an troad hag ul laur garv er poent eus un askorn kreiztroad ma tiskouez ar skinlun ur torr (sl. *fracture*).

pie herissé ◇ **gouty foot** ◇ **troad pikek** Bezañs amdeñvennoù niverus agil hag a-sol oc'h anadiñ war skinlun an troad, erzerc'had an urlou arbadet, el liesarzfo rumatoidel hag er remmoù foel henek.

pie plat, platypodie ◇ **pes planus, flat foot** ◇ **troad plat** Distummadur an troad naous dre steuz argevegezh ar sol, gwariad ar seul war ezkamm, istant ar c'higennoù etrekernel a-sol, laoskegezh ar stagelloù, ha dazledad ar raog troad war ar sol; an *troad plat ezkamm diasavel* (Gl. *pie plat valgus statique*), direadus, ne seller ket evel ezreol betek an oad a 5 vloaz (sl. *laxité, tarsalgie des adolescents*).

pie plat valgus convexe ◇ **congenital convex pes valgus, congenital vertical talus, rocker bottom flat foot** ◇ **troad plat ezkamm argeinek, fer b. a-zerc'h ganedigel** Kammeuziad kemplezh a 'n troad o c'hoarvezout eus ur raog troad ezkamm war bleg a-gil, rakkamm ar seul hag enbalriad ar bloc'h fer-bulzuneg; ent neuziadurel e c'hoarvez an *t. p. e. a. eus diazerc'hadur* an askorn fer pe eus ar c'henaskornad seul-bulzuneg; en dro-mañ diwezhañ e reer anv eus *troad pioled* (sl. *pie convexe congénital*).

pie rond ◇ **sag foot** ◇ **troad ront, troad flak** Argeinegezh sol ar raog troad da heul flakadur bolz ar c'hreiztroad.

pie dra ◇ **pie dra** ◇ **pie dra g.** Kleñved ar blev (briger, barv, abrantoù) diwar ur foue arvevat, naous ent klinikel dre ar vezañs eus ulmennoù kalet a-strew war ar garennoù, pep ulmenn o vezañ ur gronnadur eus spor un *Trichosporon*; anaez boutin e Kolombia, dibaot en hon hinadoù.

piezoélectricité ◇ **piezoelectricity** ◇ **gwasktredan g.** Dinod ur c'hemm barr etre daou benn ur strinkenn a arloer outi ur gwaskad pe ur sachad, anadenn e dalc'h hanabelegezh meteier evel ar strinkennoù; korvo a c'hounezer ganti evit treiñ un arhent treloc'hel en arhent tredanel (lenn ur bladenn vinil), pe evit treiñ un arhent tredanel en ul luskellad treloc'hel (eurier kouarz).

piézoigramme ◇ **piezogram** ◇ **piezogramm g.** Kevregad dewerc'hed dre araez ar piezograf; ar *p. talmerel* (Gl. *p. artériel*) zo ar grommenn o terc'hennañ argemmadoù diadaol ar gwask talmerel.

piezographie ◇ **piezograph** ◇ **piezograf g.** Ardivink amkanet da lerc'hwezañ ar gwaskoù.

piézoographie ◇ **piezography** ◇ **piezografiñ** Lerc'hwezañ ar gwaskoù; ar *p.*, arveret da studiañ stad an talmerennoù, ken war eun dre ur sont sanket en dalmerenn, ken ameeun a-dreuz an amwiskadoù, zo bet dilezet e gounid an Doppler (sl. *Doppler : examen ~*).

pigment ◇ **pigment** ◇ **livegenn b.** Danvezenn du pe livek bezant er gwiaoù struzhel pe loenel.

pigment biliaire ◇ **bile pigment** ◇ **livegenn vestl pe vestlel** Danvezenn livek bezant er vestl, o tisoc'h eus ec'haozañ an hemoglobin (sl. *acides biliaires, bilirubine, biliverdine, sel biliaire*).

1 pigmentaire, pigmenté 2 pigmentaire ◇ **pigmentary** ◇ **1 livegennek aa., livegat aa. 2 livegennel** 1 Oc'h enderc'hel ul livegenn, sk. : *luc'hsaefo livegennek* (Gl. *rétinite pigmentaire*), *kroc'henfo livegennek* (Gl. *dermatite pigmentée*), *brizhennoù livegat* (Gl. *taches pigmentaires*). 2 A-zave d'ul livegenn, sk. : *strafuilhoù livegennel* (Gl. *troubles pigmentaires*).

pigmentation ◇ **pigmentation** ◇ **livegañ, livegad g., livegadur g.** Bezañs reol pe ezreol livegennoù e lec'hioù 'zo eus ar bevedeg, eus an amwiskadoù pergen.

pili bactériens, fimbriae ◇ **pili, fimbriae** ◇ **pili s. bakteriel** Gwianoù gorre hadennoù Gram+ 'zo (kolibazhilli, gonokok), nad int na blevanoù, na skourjezigoù, met gwezherioù e c'hlenont drezo ouzh ar c'helligoù a boreont; korvoet e vez luniad antigenel ar pili, anezho polimeroù ur protein, ar *pilin* (Gl. *piline*), evit oberiañ vaksinoù.

pili torti, trichotortosis ◇ **pili torti** ◇ **briger s. gwiblet, trikotortoziz g.** Miwe ganedigel ha hogos bepred hêrezhel a 'r briger; ar re-mañ, o tinodiñ gant dale, zo dezho doare ar gloan, gweet pep blevenn warni he unan; d'ar gaezouregezh e tedro ar briger etrezek an neuz reol pe dost.

pilivaccin ◇ **pilivaccine** ◇ **pilivaksin g.** Vaksin oberiet adal ar pili bakteriel.

Pillay : syndrome de ~ ◇ **Pillay syndrome** ◇ **azoniad Pillay** Kevreted kammneuziadoù lagad (demerad ar gornsae), ar c'haved (tougnded ar c'horn, kendeuzad gaved-ividig) hag an izili (iswe darnel eskern an arvrec'h), azoniad treuzsaet er mod aotzomek trec'hek.

pilocarpine ◇ **pilocarpine** ◇ **pilokarpin g.** Alkaloid dispiskeveler douhennet eus delioù ar *Pilocarpus jaborandi*, arveret da brederiañ ar glaokom ha da zec'han ar mabisvoll.

pilon ◇ **wooden leg, pylon** ◇ **gar b. goad, esker b. goad** Osod eeunañ a 'n ezel traoñ, hep kenvell.

pilosébacé ◇ **pilosebaceus** ◇ **blevsoavel aa.** A-zave d'ar vlevenn ha da wagrenn ar soav.

pilule ◇ **pill** ◇ **pilulenn b.** Furm c'halenek da evurñ oc'h enderc'hel ar wezhuzenn gant pe hep ambrougenn e rezh ur bellennig kantalc'hek; hiziv, er c'haozeeg, e reer gant *p.* da aroueziañ un hilastaler evurñ (*Sz. birth control pill, BCP*); *p. antronoz* (Gl. *pilule du lendemain*), doenad uhel estrogen ha progesteron o telankañ ar mizioù, kemeret war-benn hepkoriñ enneizhiad ar vi spriet (sl. *cachet, capsule, comprimé, contraceptif, gélule, médicament, ovule*).

pince ◇ **forceps** ◇ **gevel b.** Ardivink amparet gant div loc'henn geharp ha krabanoù en araez da c'havaelañ pe da zerc'hel ur gwiad pe un organ; diforc'hiñ a reer daou rizh gevelioù : *a*) ar *g. winterellek* (Gl. *p. à ressort*), ar re arveretañ o vezañ ar *g. anroañ* (Gl. *p. à disséquer, Sz. dressing f.*), dezho krabanoù plat (*Sz. thump pe thymp f.*), rizennek pe get, skilfek (*Sz. mouse tooth f.*) pe get, *b*) ar *g. kenvellet* (Gl. *p. articulées*), outo a-wechoù un dreznenn, araezus d'o azderc'hel stardet kreñv, hag alies, e penn all o loc'hennoù, gwalennoù evit bizied an oberataer (*g. gwadkaeañ* sl. *hémostatique*).

pince, pincement ◇ ◇ **gwask-, amwask-, enk-, genn-, tag-, tagell-, skoulm-** Pennrannoù arveret da aroueziañ strishad ur furmadur neuziadurel gant ur furmadur pe furmadurioù all, sk. : *avelellenn gorndaget* (Gl. *pincement her-niaire*) (sl. *artère méésentérique : syndrome de l'~, herniaire, pincement articulaire, Sébileau : signe de ~*).

pince de homard ◇ **lobster-claw difformity** ◇ **pav g. krank** Kammneuziad naouus dre ur faout e kreiz an dorn pe an troad gant ezvezañs ar biz kreiz, pe, er furmoù eizhañ, bezañs an daou viz l ha 5 nemetken.

pincement articulaire ◇ **joint space narrowing** ◇ **kenvell g. enkesaouet, enkesaou g.** Strishadur an esaou etre daou dalbenn kenvellañ, azon boas an askornarzfó torzhellek (sl. *ostéo-arthrite*).

pineal : syndrome ~, syndrome épiphysaire ◇ **pineal syndrome** ◇ **azoniad ar c'hourjadenn** Teskad ar strafuilhoù devoudet gant yoc'hennoù ar c'hourjadenn : klopennad, uswask enklopennel, azonoù bredel, seizi an daoudañvoù nervennoù aglopenn III, IV, VI, azoniad Parinaud, arouez Argyll Robertson (steuz an damoug mabel ouzh ar gouloù ha mabisvoll padek), keurc'hanadkorfegezh, dedroadur etrezek strafuilhoù ilpennel ha gouzerc'hvelel.

pineal : corps ~, TA corpus pineale ◇ **pineal body** ◇ **gourjadenn g.** Korf gwagrennek bihan a 'n empenn, (anvadoù kent : *épiphyse cérébrale, glande pinéale*, sl. *l'épiphyse, épithalamus*).

pinealoblastome, pinéoblastome ◇ **pinealoblastoma** ◇ **pinealokitom g.** Yoc'henn yud a 'r c'hourjadenn.

pinéolocyto, pinéocytome ◇ **pinealocyto** ◇ **pinealokitom g.** Yoc'henn kuñv ent wiadoniel a 'r c'hourjadenn.

pinéalome ◇ **pinealoma** ◇ **pinealom g.** Evit aozerion 'zo, nep yoc'henn, ken kuñv, ken yud, a 'r c'hourjadenn; evit aozerion all, termen kenster da *pinealokitom* (sl. *pinéolocyto*).

pinguécula, pinguicula ◇ **pinguecula** ◇ **pinguekula g.** Balirenn vihan arvelenn dric'hornek loet war ar gevresae, he diaz war wrimenn ar gornsae, ouzh he ober un hogennad hialin ha tammoù gwiennoù dastennek, anaf kuñv a stader war an henaded.

Pinkus : tumeur fibro-épithéliale de ~ ◇ **Pinkus epithelioma** ◇ **epiteliom g. Pinkus, yoc'henn fibroepitelet Pinkus** Seurtad epiteliom diazkekelligel gant stroma usweek, gorrek kenañ e zedroadur.

pinocytose ◇ **pinocytosis** ◇ **pinokitoz g.** Degerc'hañ ha sugañ an takennoùigoù liñvenn gant ar makrofag : ur seurtad fagokitoz eo.

Piotrowski : phénomène de ~ ◇ **Piotrowski sign** ◇ **arouez b. Piotrowski** Damoug o c'hoarvezout eus plegad a-sol an troad hag argrezad kigennoù ar c'hof gar (TA *musculus gastrocnemius*) a zevouder dre giziata ar gigenn askin araok (TA *musculus*

tibialis anterior) en ur poent loet etre torosenn ar skin (TA *tuberositas tibiae*) ha penn ar spilhenn (TA *caput fibulae*); azonus e ve d'un anaf er stirad ampikernennek; stadet e vez en empenno morgoñvus (sl. *encéphalite épidémique d'Economo-Cruchet*), koulz hag er gatatoniezh hag er skizofreniezh (a zesellfed neuze evel kleñvedoù organel an nerveg); kavet e ve bet ivez goude ar barroù droukfell hag e kreuadoù an empen.

piqûre anatomique oue **d'autopsie** ◇ **dissection wound** ◇ **enkorad g. diskejañ pe kelanskejañ** Poread grevus diwar un enkorad garvevion anialek o tarvezout da heul gloazadoù darvezet en daouarn e-kerz kelanskejadoù, naouus dre anadennoù hollek, ul limfforzho hag, herrek, ur gwerblennfo hag ur morfer strewek trowerblennel (darvoud kevañzavet evel kleñved micherel).

pistolet : bruit de ~ ◇ **pistol-shot** ◇ **tenn g. pistolenn** 1) *t. p. morzhedel*, trouz goloet heñvel ouzh un tenn, merzhet pa selaouenner talmerennoù morzhed gouziviad ar skorted aortek, a-geñver gant muiad trumm ar gwask er gwazhied; 2) *t. p. bruskel*, trouz kreizsistolel kreñv, klevet en eil tachad etre-kostoù dehou e-kerz ar skorted aortek muiek, da geñver dardennad trumm an aortenn dre wered ar wagenn sistolel bannet gant argrezad ar c'hofig.

pithiatisme ◇ **pithiatism** ◇ **pitiategezh b.** Al *Pithiatismus*, termen kinniget e-tro 1900 gant Babinski en erlec'h ouzh *Hysterie* (re sammet, hervezañ, gant kennotadurioù), arveret abaoe da arouezañ ar pleg a zo gant gouzrec'hioù da erzerz'haat, dindan ar goudreñ, azonoù kleñvedoù n'o deus ket, heñvel dra da baouez ag o erzerz'haat dre levezon ar goudreñ ragene; koulz diarver eo aet an termen.

Pittsburgh : pneumonie de ~ ◇ **Pittsburgh pneumonia** ◇ **skeventfo g. Pittsburgh** Skeventad lemm grevus diwar *Legionella midadei*, o tizhout peurliesañ ar c'houziviaded hangaestalet.

1 pituitaire 2 pituitaire, pituitarian ◇ **1 pituitary 2 pituitary, pituitarian** ◇ 1 sl. *muqueuse pituitaire* 2 sl. *hypophysaire, hypophyse*.

pituite, vomissement matinal ◇ **pituita, vomitus matutinus** ◇ **flumm g., c'hweladenn b. veure** Liñvenn dourek, frontek, distreizhet ha skrouediet diouzh ar beure gant klañvourion 'zo war yun, an alkooleion pergen (sl. *hémisialémèse*).

pituitrine, rétropituitine ◇ **posterior pituitary hormone** ◇ **pituitrin g.** Douhennad eus an drekgougorfenn (TA *neurohypophysis*), ouzh e ober daou hormon polipeptidek, ar vazopresin hag an okitokin, borc'het gant gronnoù ar gouzerc'hvel (sl. *ocytocine, hypophyse, hypothalamus, vasopressine*).

pityriasis ◇ **pityriasis** ◇ **pitiriaziz g.** Anvad genadel kroc'henadoù naouus dre ur gourc'hennadur munut, ar re anavezetañ o vezañ : 1) *p. ar brigenn*, (Gl.Sz. *p. capitis*, Br. kaozeek *kenn*, Gl. kaozeek *pellicules*), anaez paot azonet dre gourc'hennoù sec'h, fin, louet, gant debreon a-wechoù ; 2) *p. damroz Gibert*, (Gl. *p. rosé de Gibert*, Sz. *p. rosea*), dermatoz o teraouiñ dre ur blakenn gentael vigelc'hiek roz en he zro hag arvelen en he c'hreiz, goloet gant gourc'hennoù fin ha pegus, oc'h emastenn dre frapadoù betek aloubiñ ar c'hef, ar gouzoug hag an izili; pareañ a ra ent emdarzh dindan 4 pe 6 sizhun; hangaetis eo; 3) *p. marellet* (Gl. *p. versicolor*), teskad brizhennoù melen sklaer pe gell, dezho un drolinenn direoliek, gourc'hennec p'o skrabber (*arouez ar skolpenn*, Gl. *signe du copeau*), hep debreon, o sezañ e rann uhelañ ar bruska ha war an divskoaz, kiriek dezhañ ur foue (*Pityrosporum orbiculare*); 4) *p. rubra Hebra*, (sl. *érythrodermie*); 5) *p. eeun* (Gl. *p. simplex*), gourc'hennadur anfoel, brennvanek eus kornaen an epiderm; 6) *p. eeun kantet pe daroued brennek* (Gl. *p. simplex circonscrit pe dartre furfuracée*, Sz. *impetigo furfuraceus*), tiennnoù arfont, damroz, gourc'hennus, stadet dreist holl war dremm ar vugale, dermatoz poreel, seurtad impetigo (sl. *impétigo*); 7) *p. steatoidel* (Gl. *p. stéatoïde de Sabouraud, dermatose figurée médiothoracique*), teskad tiennnoù hevont, lieskelc'hiek, damroz, debronek, ensilet, goloet gant kantennoù damvelen, lec'hiet war ar brennid, war ar c'hein etre an divskoaz, ha war ar brigenn gant ur rizenn roz (*corona seborrhéica*), kroc'henad o tedeñ dibennermen.

(-)**plac-**

- *centre de placement familial* kreizenn endredañ adfamilhel
- *déplacement (psycho-analyse)* treuzlec'hiañ
- *déplacement d'une particule dans un milieu kiquide* loc'h ur rannig en ur metoù liñvel
- *déplacement de l'utérus qui se trouve porté en avant* dilec'hiadur war-raok ar grozh
- *déplacement de la perception* treuzlec'hiañ ar merzhout
- *déplacement des surfaces articulaires* dilec'hiad an talbennoù kenvellañ
- *déplacement désordonné et incessant des particules morloc'h* dizurzh ha diastal an eufl
- *déplacement vertébral* dislec'hiadur ar mellennoù
- *déplacements vertébraux par une mobilisation forcée* darfiñverezh ar mellennoù
- *en remplacement de* en erlec'h ouzh
- *les particules se déplacent dans le champ électrique* ar rannigoù a ziloc'h en tredanvaez
- *médecines de remplacement* mezekniezhoù erlec'hiat
- *mettre en place, mise en place* desezañ, desezañ
- *mettre en place, insérer un implant* ensezañ un ensteud
- *placement, placer à la demande de l'entourage (psychiatrie)* endredañ ur c'hlañvour diwar c'houlenn an nesaourion
- *placer la source radioactive dans la tumeur* loañ ar vammenn skinoberiek e-barzh ar yoc'henn
- *placer sur, appliquer à, sur* arloañ ouzh
- *placer une lamelle sous l'objectif du microscope* dodañ ul lavnennig dindan amkanemm ur c'horrgresker
- *placer, déposer une petite quantité de matière fécale dans un milieu de culture* dodañ ur c'hementad mon bihan en ur metoù tiñvañ
- *qualité d'un emplacement pour ce qui est de la propagation (psychiatrie)* endredañ ul lec'hienn evit a sell treled ur sten
- *recentrer la pupille, déplacée à la suite d'une intervention* askreizañ ar mab lagad bet disloet da heul un oberata
- *remettre en place, reposer, reposition de la cloison du nez* adesezañ tilhenn ar fri
- *remettre un os en place* adlec'hiañ un askorn
- *remplacer, suppléer, se substituer à* amsvañ
- *sauter sur place* piklammat
- *se déplacer* emzilec'hiañ
- *se déplacer en tous sens* lavigañ
- *se déplacer par capillarité* silluskañ.

placebo ◇ **placebo** ◇ **plakebo g.** Angevezh apotikel, angwezhus hep gouzout d'ar gouziviad, erskrivet a) pe evit gouskorañ ur vrekur, b) pe evit gwiriañ efedusted ul lia, dre geñveriañ gweredoù al lia ouzh re ur plakebo unrezh dezhañ, (*prouad heprat*, Gl. *test à l'aveugle*, Sz. *blind test*) (sl. *double anonymat : épreuve en ~*).

placenta ◇ **placenta** ◇ **torzhienn b.** Organ an eskemmoù etre an dougerez hag ar grouell, ouzh e ober ul lodenn vamm, ar *c'hollgenn a-ziaz* (sl. *caduque basale*) hag ul lodenn grouellel, ar *c'horion* (sl. *chorion 2*), dezhañ un arc'hwel enborc'hadel (sl. *gonadostimu-line, cordon 2*).

placenta accreta ◇ **placenta accreta** ◇ **torzhienn gendiñvek** Glenadur kleñvedel an dorzhienn ouzh ar grozh; stag emañ ar bodennoù ouzh ar c'haher krozh hep kollgenn a-ziaz dazlakaet; ezreolder o tec'han sioc'hanadoù e-kerz ar vec'hiegi ha, goude ar gwilioud, gwadliñvoù, poreadoù hag azgannadoù torzhienn.

placenta prævia ◇ **placenta prævia** ◇ **torzhienn ambilh** Enlenad ezreol an dorzhienn ouzh hanrann izelañ ar grozh, o tevoudañ gwadliñvoù arreadek e-doug tri mizvezh diwezhañ ar vec'hiegi hag oc'h erodiñ ur gwilioud rakkoulzat hag erloadoù mezhat.

placenta ◇ **placenta** ◇ **torzhiennañ** Etre an 10t hag ar 14t devezh goude ar frouezhigiñ, lankad eus ar vienglenañ (sl. *ovo-implantation*) ma teraou ar c'heñverioù gwazhiedel etre ar vi speriet hag an enkrozhenn (diwan un dorzhienn gentael).

Placido : **disque de ~** ◇ **Placido disk** ◇ **kantenn Placido** Ardivink optik amkanet da studiañ glennadur teirment ar gomsae dre araez ur brouidell amparet gant kelc'hioù kengreiz.

placode ◇ **placode** ◇ **plakod g.** Tevadur lec'hiek eus an ektodern, egin an organoù skiantennel.

plagiocéphalie ◇ **plagiocephaly** ◇ **ledisvoll klopenn g., klopennledisvoll g.** Kammneuziad diwar soutadur rakkoulz untu ar mellezioù o tisc'h gant un digemparzh hag ur veskellded eus ar c'hlopenn (sl. *craniosténose*).

plaie ◇ **wound, sore** ◇ **gouli g.** Odead graet en amwiskadoù gant ur gwezher treloc'hel, gant pe hep koll danvez; evit an organoù don, e komzer eus gouli pa vez ur boulc'h en amwiskadoù da heul un daraez igor (Gl. *traumatisme ouvert*); hervez gwezher ha doare ar gouli e tiforc'her : *g. brevadel pe dre vreviñ* (Gl. *plaie par écrasement*); *g. dantadel pe dre zantañ* (Gl. *p. par morsure*); *g. diek* (Gl. *p. atone*), gouli na zedro ket nemeur na war c'hrevusaat, na war gleizennañ; *g. ebarzhus* (Gl. *p. pénétrante*) gouli graet gant ur c'hlav begek (goustilh, met ivez tach, spilhenn, draen); *g. fregadel pe dre fregañ* (Gl. *plaie par déchirure*); *g. gwanadel pe dre wanañ* (Gl. *plaie par instrument piquant*); *g. krouizek* (Gl. *p. anfractueuse*), gouli direoliek e vrielloù; *g. rastreuz* (Gl. *plaie en sétou*), gouli, forzh pe wezher a ve en e orin, o tremen dindan ar c'hroc'hen hep tizhout organoù all, dezhañ daou zigor, un enank (Gl. *entrée*) hag un ec'hank (Gl. *sortie*); *g. taravadel pe dre daravat* (Gl. *plaie par frottement*, sl. La07 46-48 ma kaver ur 15 verb, pep hini o verkañ neuz ha donder ar gouli); *g. troc'hadel pe dre droc'hañ* (Gl. *plaie par instrument tranchant*).

plaie ou blessure par arme à feu ◇ ◇ **gouli pe gloazad g. dre arm tan pe dre saezhell** Anafad graet gant ur saezhell (Gl. *projectile*), eleze gant ul loc'hell bannet dre zerluskañ (Gl. *projection*), da skouer ur bolod tennet gant ur bistolenn (sl. La-07 76-82); an *enorc'h* (Gl. *impact*) a reer eus ar poent ma vez tizhet ar c'horf; daou zegouezh a ziforc'her, hervez ma van ar saezhell e-barzh korf ar reuzied (gouli dre saezhell ebarzhat, Gl. *projectile demeurant inclus dans le corps*), pe ma trebarzh ar c'horf (gouli dre saezhell drebarzhat, Gl. *projectile ayant traversé le corps*); *enank* a reer eus ar poent enorc'h hag *ec'hank* eus poent dibenn treug ar saezhell e-barzh ar c'horf.

plan de morsure ◇ **bite plane** ◇ **blodell b. dantañ** Steudell lem-laka dodet etre an dent krec'h hag an dent traoñ evit parraat ouzh ar migecharz (sl. *malocclusion dentaire*).

plan facial ◇ **facial plane** ◇ **talenn b. fas** Talenn a-dal o tremen dre an nazon hag ar pogonion.

plan sagittal médian ◇ **median plane, midsagittal plane** ◇ **talenn a-saezh kreizer** Talenn araok-adreñv a-zerc'h o rannañ ar c'horf etre div hanterenn dehou ha kleiz damgemparzh.

planification familiale, contrôle des naissances ◇ **family planning, birth control** ◇ **steuñviñ ar genel, reoliñ ar genel** Teskad an diarbennoù kemeret gant ar c'houbladoù evit a sell ar gouennañ.

plan

• *angiome plan* angiom plaen, c'hoantaenn • *ensemble des informations héréditaires inscrites selon un plan détaillé dans les chaînes d'ADN* teskad ar stlenadoù hêrezhel enskrivet diouzh ur steuñv munudaouet en arvelloù DNA • *espacement des plans des paires de bases puriques et pyrimidiques* skar etre talennoù an daouadoù bazennoù purek ha primidek • *fibres nerveuses d'un côté s'entrecroisant en un plan médian avec leurs homologues du côté opposé* gwiennoù nerval en eil tu o kroaziañ e par un dalenn greizer gant ar gwiennoù kevelep o tont eus an tu all • *incision à plans croisés* skejañ a-groaztalenn • *formule plane* delun divvent • *les plans cutanés et musculo-aponévrotiques du cou* gweleadoù kroc'heneh, faskiennel ha kaherel ar gouzoug • *lichen plan* liken plaen • *plan de clivage* talenn disfaout • *plan de référence* talenn dave • *plan de section* talenn skejañ • *plan de symétrie* talenn gemparzh • *plan équatorial* talenn geheder • *plan frontal* talenn adal • *plan médian sagittal* talenn greizer a-saezh • *plan perpendiculaire à l'axe optique* talenn a-serzh war al luc'habel • *plan privilégié* talenn vrientek • *plan vertical* talenn a-zerc'h • *séparation de deux organes selon un plan naturel ou aisé* disrannañ daou organ hervez ur gwele naturel pe un dalenn araezus.

plaque dentaire ◇ **dental plaque** ◇ **koc'hion s. dent** Lindrad peg ouzh amailh an dent o c'hoarvezout eus danvezennoù bakteriel (*Streptococcus mutans*), kelligel, halvel ha bouedel, kevaraezus d'ar brukañ ha d'ar poreañ.

plaque motrice ◇ **motor end plate, myoneural junction** ◇ **kevre g. nervenn-kaher, pokenn b. loc'hañ** Lec'h treuzkas an nervlanv eus dibenn an akson d'ar wienn gaher, anezhañ ur sinaps gronnet gant ar c'hever etre an endoneuriom hag an endomiziom (sl. *axone, endomysiom, endonèvre, fibre musculaire, influx nerveux, synapse*).

plaquettes, thrombocytes ◇ **platelets** ◇ **pladanoù l. (g.), trombokit s.** Elfennoù luniek digraoñell eus ar gwad (etre 200 000 ha 400 000 dre mm⁻³), dezho neuz bazhigoù gwerzhidek pe kantennoù (etre 2 ha 3 µm ment), evodet eus ar megakariokit,

ganto ur roll pouezus e kaoulederezh ar gwad ez int ar gwezherioù kentañ anezhañ pa zelkont ar *gwadkaeañ kentañ* (sl. *adhésion des plaquettes, agrégation des plaquettes, hémostase, release, thrombasthénie, thrombopathie, thrombopénie*).

plaquettes grises : **syndrome des ~** ◇ **grey platelet syndrome** ◇ **azoniad ar pladanoù louet** Pladanañez genezhel nemedennek, anezhañ un olpladanoù leiek, pladanoù brasoc'h un disterañ, dreist holl hep greunennadoù azurlen, dre se diouer ar parennoù endalc'het ganto (fibrinogen, parenn Willebrand, h.a.) ha, da heul, ar gwadliñvoù, erzerc'hadenn glinikel pennañ an azoniad.

(-)**plaque(-), placard**

• *activité agrégante plaquettaire* pladandazusted • *agrégation des plaquettes* pladandazañ • *antiplaquettaire* pladanharzer • *clou-plaque* tach-plakenn • *clou pla-quettaire* broch pladanel • *confluer en placards étendus* daskantañ e plakadoù ledan • *exfoliation de l'épiderme sous forme de plaques* dispeliañ an epiderm e rezh plakennoù • *hyperplaquettose, thrombocytose* elbladanoù, pladanusvec'h • *hypo-plaquettose, thrombopénie* olpladanoù, pladanusvec'h • *morpheé en plaques* morfea plakennek • *placards érythémateux* plakadoù eritematus • *placards rouges œdéma-teux* plakadoù ruz gouliñvek • *plaque basale, couche basale* haen diaz • *plaque cartilagineuse (cartilage de conjugaison)* disk talpenn • *plaque choriale* haen gorion • *plaque d'athérome* plakenn aterom • *plaque des fumeurs* plakenn ar vutunerion • *plaque unguéale* korf an ivin • *plaques de Peyer* pannoù Peyer • *plaques séniles* plakennoù kozhiadel • *plaquettaire* pladanel • *sclérodémie caracté-risée par des placards arrondis* skleroderma naouus dre bannoù aront • *sclérodémie en plaques* skleroderma strewek • *sclérose en plaques* skleroz strewek • *thrombocytose* elbladanoù, pladanusvec'h.

plasma ◇ **plasma** ◇ **plasma** g. Kedrann liñvel eus gwiadou 'zo; *p. ar gwad*, (Gl. *p. sanguin*), kedrann eus ar gwad er feur reol a 550 g/l, liñvenn m'emañ en arlung an elfennoù luniek.

plasma frais congelé ◇ **fresk frozen plasma** ◇ **plasma fresk skornet** Plasma eraozet adal gwad ur roer hepken, disparti en ur metoù kloz ha skornet e-doug 6 h d'ar muiañ goude an erlemel; miret e vez ur bloavezh pad d'ar muiañ d'ar gwrezverk -30°C ; e zanveziñ a reer goude un diskornañ herrek e-barzh un enkae gwrezstabil da $+37^{\circ}\text{C}$.

plasma : **succédané du ~** ◇ **plasma volume expander** ◇ **erlec'hiad** g. **ar plasma** Liñvenn golloidel (albumin, dekstran), kevatal he gwask onkotek da hini ar plasma, a drefenner er wazhienn en amkan kevassav arwastadez ar gwad ha mirout ouzh ar gwadisec'honad, eleze ouzh fuadur ar plasma d'an ec'honenn ezwazhiel (Gl. *espace extravasculaire*), (sl. *colloïdal : état ~, compensa-tion, équilibre 3, hypovolémie*).

plasmaphérese ◇ **plasmapheresis** ◇ **plasmaedranñañ** Dispartiañ *in vitro* ar plasma diouzh elfennoù luniek ar gwad; ar re-mañ a walc'her hag a zaskorer d'ar gouziviad dre o ensinklañ en e wazhiennoù, en ur erlec'hiañ plasma denel pe plasma kalvezadel ouzh ar plasma ezvevennet; hentenn guradel arveret a-wechoù evit disammañ ar bevedeg diouzh globulinoù plasmatek ezreol (disglobulinemiezh, kleñvedoù unanhangaeel, kleñvedoù an hangaegemplezhioù); e degouezhioù all e vez miret ar plasma edrannet en askont d'an antikorfoù a zo ennañ ha d'un arver da zont eus e berzhioù hangaeañ (sl. *cytaphérese, érythraphérese, hémaphé-rese, leucaphérese*).

plasmathérapie ◇ **plasmatherapy** ◇ **plasmagurañ** Danveziñ yac'hadel plasma ar gwad (notañ an arver ankewer a ra aozerion 'zo eus *p.* evit arouezañ an ebarzhiñ er bevedeg eus dileizhadoù kengrennek sallet pe glukozek graet ivez anezho, ankeweroc'h c'hoazh : "*sérums arti-fi-ciels*") (sl. *sérothérapie*).

plasmatique, plasmique ◇ **plasmatic, plasmic** ◇ **plasmatek aa.** A-zave d'ar plasma (sl. *plasmique*).

plasmide ◇ **plasmid** ◇ **plasmid** g. Elfenn hilel bezant e-barzh bakteri 'zo, distag diouzh ar c'hromozomoù, bihanoc'h a-galz egeto, amparet evelto koulskoude gant DNA hag o furniñ gen, araezus da c'henele dre zasparañ azeiladoù unrezh dezhi; ar re-mañ, treuztoet e bakteri all, a dreuzfurm o glad hilel ha, diouzh an dro, a bourchas dezho harzusted ouzh ar bevastalerioù; alese an anv a reer eus *plasmidoù an harzusted* hag eus *harzusted plasmidel* (sl. *épisode, facteur F, facteur R, réplication, résistance bactérienne aux antibiotiques, vecteur*).

plasmique ◇ **pasmic** ◇ **plasmel** aa. A-zave d'ar protoplasm (pe kitoplasm), (sl. *protoplasme*).

plasmoblastes ◇ **plasmoblasts** ◇ **plasmoblast** s. Kelligoù bras etre 15 hag 20 μm treuzkiz, bezant er mel eskern ha dreist holl er gwad limfoidel; diouto ez evod ar *proplasmokit*, diaraogerioù ar *plasmokit*; evodiñ a rafe ar *p.* eus al *limfokit B* (sl. *lymphocytes, lymphoïde : système pe tissu ~, plasmocytes, proplasmocytes*).

plasmocytes ◇ **plasmocytes** ◇ **plasmokit** s. Kelligoù limfoidel aront pe vigelc'hiek, etre 15 hag 20 μm treuzkiz, bezant er mel eskern hag er gwad limfoidel, gant ur protoplasm o telenañ unvan ha stank livuzennoù bazek anilin hag ur graoñell ezkreizet loet en ur blein eus ar gellig, enni 5 pe 6 greunenn gromatin heliv kenan; ent klasele ez evod ar *p.* eus ar plasmoblast dre hantererezh ar plasmokit, hag amparañ un ac'had dizalc'h; hervez ur goulakadur all avat e teverfent eus al limfokit B; ur roll a bouez o devez ar *p.* en hangae dourennel dre vorc'hañ an immunoglobulin (sl. *cellules B, immunité, lymphocytes, Türk : cellules de ~*).

plasmocytomatose ◇ **plasmocytomatosis** ◇ **plasmokitomatoz** g. Anaev naouus dre baotidigezh ar plasmokit.

plasmocytome, myélome plasmocytaire ◇ **plasmocytoma, plasmocytary myeloma** ◇ **plasmokitom** g., **mielom** g. **plasmokitek** Yoc'henn askorn evodet diouzh elfennoù kelligel ar mel eskern (mielom), muiek enni ar plasmokit; diouzh an dro e vez kuñv pe yud, unel pe liesel (sl. *Kahler : maladie de ~*); stadañ a reer furmoù ec'haskornel (skeventel, fric'hargadennel, koazhadel, kroc'henele).

plasmocytose ◇ **plasmocytosis** ◇ **plasmokitusriñv** g., **elblasmokit** g. Paotidigezh vras pe vrasoc'h plasmokit; *p. askorn*, erwezh elblasmokitek foel henek ar mel eskern stadet e-kerz an dorzhellegezh, ar poreadoù henek ha kleñved Hodgkin.

plasmode ◇ **plasmode** ◇ **plasmod** g. Tolzenn o tisoc'h eus kendeuz lies amoeb, oc'h amparañ ur galzenn danvez bevedel a zo dezhi an darn vuiañ eus perzhioù ar protoplasm, araezus enta d'an imboure'hioù armodel.

plasmodicide ◇ **plasmodicidal** ◇ **plasmodiomlazzh** aa. Gant ar perzh lazhañ ar *Plasmodium*, arvevad kiriek d'ar baludegezh (sl. *paludisme, Plasmodium*).

Plasmodium ◇ **Plasmodium** ◇ **Plasmodium** g. Gwezher ar baludegezh (sl. *paludisme*), genad hematozoed gougevret ouzh kevrennad ar Sporozed, urzhad ar C'hokidi, kerentiad ar Plasmodideged, arvevaded dastrigat, eleze o rankout tremen dre lies ostiz evit diorren, daou en degouezh : 1) an den, mirva ar virus, ma ren ar *P* lankad ar gouennañ anrevel (*kor skizogonek*, Gl. *cycle schizogonique*) e diabarzh an hemati, 2) an anofel benevel, an trezougered, ma c'hoarvez lankad o gouennañ revel (*kor sporozoek*, Gl. *cycle sporozoïque*); kleñvedus ouzh an den ez eus pevar spesad *P.* : a) *P. falciparum* pe *praecox*, gwezher an terzhiennoù spanaus (sl. *fièvre intermittente*), dreist holl an terzhiennoù tredeek ganas (sl. *double tierce* : *fièvre* ~, *fièvre pernicieuse, tierce* : *fièvre* ~), a gleñvedusted vras, kiriek da 90 % eus ar varvusted dre baludegezh; b) *P. malariae*, o tec'han an terzhiennoù pevarek (sl. *quarte* : *fièvre* ~), kuñv met kilvers; c) *P. ovale*, nes d'an *P. vivax*, o tec'han barroù terzhienn dredeek kuñv bep 48 pe 50 h; d) *P. vivax*, ar paoñ, gantañ ur c'hor anrevel 48 h, arvevad an "terzhiennoù tredeek kuñv", grevus en desped d'an deavad.

plasmolyse ◇ **plasmolysis** ◇ **plasmoliz** g. Treleizhiñ a-dreuz ar goc'henn, anadenn a zewerc'her dre lakaat ar c'helligoù e diastok an drelezhenn usgrennek, e se dre lemel diouto un darn eus an dour hag ober d'o frotoplasm kurzhañ.

plasticité ◇ **plasticity** ◇ **1 mezelled b., mezelladusted b. 2 hezelv g., hezelvusted b.** 1 Perzh fizikel ar c'horfoù da gemmañ stumm dre wered an nerzhoù arloet outo. 2 Perzh ar gwiadoù, an organoù hag ar bevedegoù da zaskemmañ o doareoù emvagañ ha diorren hervez an amveziadoù.

(-) **plastie, opération plastique** ◇ **-plasty, plastic operation** ◇ **(-)atelveñ, dazluniañ, gwezh g. pe oberatadenn b. atelveñ pe dazluniañ** Oberatadenn amkanet da ratreañ un organ pe ur parzh organ, eleze da zaskoriñ dezhañ gant ar bihanañ arlenadoù e neuz ha/pe e arc'hwelioù, sk. : *gwezatelveñ* (Gl. *cheiloplastie*) (sl. *chirurgie plastique*).

plastination ◇ **plastination** ◇ **plastinañ** Kalvezder kemmirout neuz ur gwiad pe un organ dre ensilañ enno rousinoù pe mezelloù.

plas-, plasm-, plast-

• *achondroplasia* migronangwe • *alvéoloplastie* logigatelveñ • *amyoplasie* kaheriswe • *angiodyplasie* gwazhiedviwe • *angiome néoplasique* angiom nevezweek • *angio-plastie* gwazhiedatelveñ • *antinéoplasique* enephangwe, enephangweek • *antiplas-mine*, plasmindolc'her • *aortoplastie* aortennatelveñ • *aplasie vaginale* gouinangwe • *aplasique, aplastique* angweel, angweek, angweüs • *arthroplastie* arzatelveñ • *cana-licule intracytoplasmique* kanolig enkitoplasmel • *chirurgie plastique* surjianerezh atelveñ • *cinéplastie* fiñvatelveñ, bevfiñvekaat • *coefficient plastique* gwezhiader mezelled • *cytoplasme* kitoplasm • *dysplasie* miwe • *greffe homéoplastique, homo-plastie* unspesadimboud • *hyperplasique* uswe • *intervention plastique* gwezhiadenn dazluniañ • *myéloydysplasie* eskernvelviwe • *myoplastie* kaheratelviñ • *néoplasique, néoplastique, cancéreux* hanweek, hanweel • *néoplasme malin* nevezwe yud, hanwe • *ophthalmoplastie* lagadatelveñ • *oschéoplastie* gousac'hatelviñ • *ostéo-chondrodysplasie* miwe askornmigorn • *phénomène plasmatique* anadenn blasm-atek • *plasmine* plasmin • *plasmocytes* plasmokit • *plasticité des cellules sanguines* mezelled kelligoù ar gwad • *plastifier* mezellaat • *plasticité motrice* hezelv kaherel • *plasturgie* mezellouriezh • *plasturgiste* mezellour, mezellwezhour • *processus néoplasique* pe • *néoplastique* argerzh nevezweat • *thromboplastine plasmatique* tromboplastin plasmatek.

plastron appendiculaire ◇ **appendicular lump, appendix mass** ◇ **talp g. divilhennel** Tolzad gwevn, ledek pe ledekoc'h e poull ar glun dehou e-kerz souzvezh barroù 'zo divilhennfo, a verzher ouzh an teuta evel bezañs un hobregonad dindan speur ar c'hof, erzerc'hadenn un erwezhiad divilhennel lec'hiek.

plateau canadien ◇ **Canadian plate** ◇ **tablez g. -ioù kanadian** Plakenn brenn enni ur rouedad toullou, ibilien ha dastennelloù arveret evit azgouestaat kigennoù an dorn.

(-) **plat(-)**

• *aplatis, de forme aplatie* arblat • *fièvre en plateau* terzhienn a-wastad • *frémissement rapide perçu par la paume de la main posée à plat sur un anévrisme artériovineux* daskren herrek merzhet gant palv an dorn harpet plaen war un darvoll talmerenn-gwazhienn • *polyglobulie observée dans la population des hauts-plateaux des Andes* elruz stadet e poblañs krec'hdaolioù uhel an Andez.

Plathelminthes ◇ **Plathyelminthes** ◇ **Plathelmint** s. Kevrennad preñved naouus dre o stumm plat, hep kavenn gorf nag organoù analat ha koazhañ, arvevat an hanter eus o spesadoù (sl. *Cestodes, Distomes, helminthes, Tænia, Trématodes*).

platinose ◇ **platinosis** ◇ **platinoz** g. Teskad an ezerc'hadoù kroc'heneel hag analadel, a rizh allergek, o tarvezout gant ar vicherourion a zornata haliou kemplezh platin; goulerc'hat e vezont peurliesañ ha diargiz.

1 plâtre 2 plâtre, appareil plâtré ◇ **1 plaster 2 plaster cast** ◇ **1 plastr g. 2 plastrenn b., steudell b. blastret** 1 Poultr sulfat kalkiom eztennet eus ar gips. 2 Stignadell, ouzh he ober bandennoù tarlatan intret gant plastr, glebiet, rodell en dro d'an ezel a vinner diloc'hekaat, ha lezet da galetaat dre sec'hañ; hiziv, evit aozañ ar steudelloù, e tenner da erlec'hiañ ar mezell ouzh ar plastr.

platycéphalie ◇ **platycephaly** ◇ **klopennissav g., isvolz b. klopenn** Disneuziad ar c'hlopenn, izelaet ar volz anezhañ.

platypnée ◇ **platypnoea** ◇ **gourvezhec'hwezh g.** Trec'hwezh o leiaat pa dremener eus al loadur war sav pe koazec d'al loadur gourvez (sl. *orthodéoxie, orthopnée, platypnée-orthodéoxie* : *syndrome* ~).

platypnée-orthodéoxie : **syndrome** ~ ◇ **platypnoea-orthodeoxia syndrome** ◇ **azoniad gourvezhec’hwezh-ortodeoksiezh** Kevreted un trec’hwezh hag un olbec’h oksigen talmerel muiaet gant al loadur war sav ha leiaet gant ar gourvez, azoniad bet stadet da heul ar skeventezvenañ, e-kerz darvoll an aortenn a-sevel, ar skoevou dehou-kleiz etre-kentezoù pe ar fic’hioù talmerenn-gwazhienn enskeventel; pa c’hoarvez e ser un avuad henek (kirroz) e reer anv a *azoniad avu-skevent* (Gl. *syn-drome hépatopulmonaire*) (sl. *orthodéoxie, platypnée*).

platyrrhinien ◇ **platyrrhine** ◇ **fronusledeg g. -eion** Termen denoniezh ha tudouriezh da arouezñ ar gouennadoù tud dezho ur fri ledan hag arblat.

platysma g., TA platysma ◇ **platysma** ◇ **kigenn blat, platisma** (Anvadoù kent : Gl. *muscle peaucier du cou*, PNA *musculus platysma*) teskad hordennoù kaher enlenet ouzh diaz ar c’haved, haenadoù don kroc’hen ar voc’h, freilh an divweuz, rannbarzh arak-kostezel ar gouzoug hag ar rannbarzhioù is-trebez ha kern skoaz; sachañ a ra war draoñ kroc’hen an elgezh hag ar weuz izelañ (sl. *peaucier* : *signe du* ~).

platyspondylie ◇ **platyspondilisis** ◇ **mellennissav g.** Kammneuziad naous dre arblated un pe lies mellenn, stadet e mideañ-ou ’zo a ’r migorn, e kleñved Morquio pergen (sl. *Morquio* : *maladies de* ~ 2).

(-)**plégi(-)**

• *cardioplégie* kalonseizi • *cystoplégie* c’hwezhigellseizi, • *diplégie* daouseizi • *gan-glioplégique* kangrenndolc’hañ, kangrenndolc’her • *gastroplégique* kruzankorzh • *hémiparaplégie* ledtreuzseizi • *hémiplegie* ledseizi • *hémiplegie à bascule* ledseizi tugindu • *hémiplegie proportionnelle* ledseizi ingal • *hémiplegique* ledseizieg • *iridoplégie* envezseizi • *laryngoplégie* garloc’hennseizi • *monoplégie* unseizi • *ophtalmoplégie* lagadseizi • *paraplégie* treuzseizi • *paraplégie spastique* pe *spasmo-dique* treuzseizi dasstrizhek • *neuroplégique* nervisreer • *iétraplégie* pevarseizi • *tussiplégique* eneppez, eneppezeg.

pléiotropie ◇ **pleiotropism** ◇ **elerzerc’haat, pleiotropegezh** Perzh gant ur c’henenn da erzerc’haat doareennoù liesel ha hep keñverioù furmel boutin etrezo, korvoet en hilouriezh, da skouer pa zevouder dargenadoù war-benn gwellaat askorusted c’hounezel ar plant.

pléocytose, hypercytose ◇ **pleocytosis** ◇ **usniver g. kelligoù, elgellig g.** Paotat ar c’helligoù e liñvennoù ar bevedeg, al leukokit er gwad amredat pergen, anadenn stadet e kleñvedoù ’zo, met ivez goude ar predoù pe e-kerz ar vrazded.

pléomorphisme ◇ **pleomorphism** ◇ **elneuz g., elneuziegezh b.** Perzh gant bakteri ’zo da gemmañ neuz hervez an amvezadoù.

pléonostéose, kleñved Léri ◇ **pleonosteosis** ◇ **pleonosteoz g.** Anaev hêrezhel o wazhañ diorreadur an eskern, treuzkaset er mod trec’hek, anezhañ soutadur kentrat an talpennoù, disneuziad hag usteñv eizhaennoù an eskern, o tevoudañ an diaez fiñval; anatoc’h en ezel krec’h (dorn berr, tev, karrezek, bizied war bleg, arvec’h palvstouet, brec’h war c’hwel diabarzh); alies un enebrezh downvanek; aozerion ’zo a wel eno ur seurtad poliosteokondroz (sl. *Moore-Federman* : *syndrome de* ~).

pléthysmographe ◇ **plethysmograph** ◇ **pletismograf g.** Enkae kloz arveret evit erc’hwiliañ an arc’hwelioù anadell, dre vuzuliañ an ec’honadoù aer deloc’het dre an en-hag an ec’hanalañ.

pleural ◇ **pleural** ◇ **˘krezenn, ˘krezennel aa.** A-zave d’ar grezenn, sk. : *rimiad ar c’hrezoù* (Gl. *frottement pleural*).

pleuraliser ◇ **pleuralization, pleuroplasty** ◇ **krezennaat** Tennad arbennik eus ar bruskenbenañ, anezhañ pallennañ gant gwiad krezenn ar gorreadoù arwodus hag ar skarvennoù bronkez pa vez anezho.

pleurectomie ◇ **pleurectomy** ◇ **krezennezvenañ** Dazbidañ ul lodenn ledek pe ledekoc’h eus ar grezenn a-speur, dewerc’het a-wechoù e-kerz an distoagennañ krezennskeventel (sl. *décortication*).

pleurésie, pleurite ◇ **pleuritis** ◇ **krezennfo g.** Tanijenn ar grezenn, lemm pe henek, gant pe hep fennad etre an div feilhenn; lies furm a ziforc’her hervez 1) natur liñvenn ar fennad (*k. levrfibrine*, Gl. *p. sérofibrineuse*; *k. gwadliñvek*, Gl. *p. hémorragique*; *k. linek*, Gl. *p. purulente*); 2) arbenn ar fennad (*k. remmel*, Gl. *p. rhumatismale*; *k. kankrel*, Gl. *p. cancéreuse*; *k. breingedel*, Gl. *p. gangréneuse*; *k. torzhellek*, *p. tuber-culeuse*; *k. diwar hadennoù liesseurt* : *pneumokok, pneumobazhell, strepokok*, h.a.); 3) sez ha ment ar fennad (*k. daoudou*, Gl. *p. double*; *k. kelc’hspeurrennel*, Gl. *p. diaphragmatique*; *k. etreflizepennel*, Gl. *p. inter-lobulaire*, h.a.); 4) hervez stad ar gouziviad (*k. ar galongleñvion, ar vugale, an henaded*, h.a.) (sl. *Bornholm* : *maladie de* ~, *myalgie épidémique*).

pleurétique ◇ **pleuritic** ◇ **˘krezennfo, krezennfoel aa.** A-zave d’ar c’hrezennfo; *sourr k. pe krezennel* (Gl. *souffle p. pe pleural*), *sourr korzennek*, ec’hanalel, flour, mouget o tont da skouarn ar selaouenner a-dreuz ur skevent amwasket gant ur fennad er c’hrezoù.

pleurodèse ◇ **pleurodesis** ◇ **krezennandiñvañ** Dewerc’hañ glenad ar c’hrezoù war-benn parraat ouzh adfeilh ur fennad aezhel pe liñvel.

pleurodynie ◇ **pleurodynia** ◇ **krezennwa g.** Pistig a-geñver gant ar grezenn; *krezennwa tredizhus* (Gl. *pleurodynie contagieuse*), sl. *myalgie épidémique*.

pleurolyse ◇ **pleurolysis** ◇ **krezennezglenañ** Dizalc’hediñ div feilhenn ar grezenn diouzh ar glenelloù ouzh o c’hempegañ.

pleuropéricartite ◇ **pleuropericarditis** ◇ **krezennamgalonnenno g.** Tanijenn diaser ar grezenn hag an amgalonnenn.

pleuropneumonectome ◇ **pleuropneumonectomie** ◇ **krezennskeventezvenañ** Dazbidañ en ur ser ar grezenn hag ar skeventenn danloet : oberatadenn ergemennet e tro an dorzhellegezh krezennskeventel gant troc’hKrezennfo.

pleuropneumonie ◇ **pleuropneumonia** ◇ **krezensskeventfo** g. Tanijenn diaser ar grezenn hag ar skevent.

pleuroscope ◇ **thoracoscope** ◇ **pleuroskop** g., **torakoskop** g. Endoskop a erc'hwilier gantañ kavenn ar grezenn bet dardennet warbouez ur bruskaezhad.

pleuroscopie ◇ **thoracoscopy**, **pleuroscopy** ◇ **krezennwereañ**, **bruskwereañ** Erc'hwiliañ gweledele kavenn ar grezenn gant ur pleuroskop ebarzhet dre araez ur broskan.

pleurothotonos ◇ **pleurothotonus** ◇ **stlezustant** g. Emstumm o c'hoarvezout a-wechoù en tetanoz : da heul dargrezadur an holl gigennoù eus ur c'hostez, ez a korf ar c'hlañvour war neuz ur warenn troet agleiz pe a-zehou (sl. *opisthotonos*, *orthotonos*).

pleurotomie ◇ **pleurotomy** ◇ **krezennenbenañ** Digeriñ ar grezenn war-bouez un erc'hel, pe evit karzhañ un hogennad liñvel, pe evit ebarzhiñ ur pleuroskop.

plèvre, TA **pleura** ◇ **pleura** ◇ **krezenn** b., l. : **krezoù** Lienenn levrus o c'holeiñ ar skevent, ouzh he ober div feilhenn, ar *k. askevent* (TA *p. pulmonalis*) hag ar *k. a-speur* (TA *p. parietalis*), houmañ diwezhañ rannet etre *k. a-gostoù* (TA *pars costalis p. parietalis*), *k. aboullkreuz* (TA *pars mediastinalis p. parietalis*) ha *k. a-gelc'hspereunn* (TA *pars diaphragmatica p. parietalis*); keneret emañ an div feilhenn dre aspleg ar c'hrezoù (TA *recessus pleuralis*), etrezo ent reol ur gavenn vannek.

plexalgie ◇ **plexalgia** ◇ **plezhadost** b. Nervost en ur blezhad nerval, emrenek (TA *plexus autonomici*) pergen.

plexectomie ◇ **plexectomy** ◇ **plezhadezvenañ** Dazbidañ ur blezhad nerval pe gwazhiennel.

plexite, **syndrome plexulaire** ◇ **plexitis** ◇ **plezhadfo** g. Tanijenn ur blezhad a-livenn (TA *plexus spinalis*, Gl. PNA *plexus nerveux rachidien*), oc'h erzerc'hañ dre seizioù hollel gwak, strafuilhoù eraezadel bras ha daralladoù barrwezadel (sl. *polyradiculonévrite*).

plexulaire ◇ **plaxular** ◇ **plezhad**, **plezhadel** aa. A-zave d'ur blezhad, da blezhadoù.

1 plexus, **plexus nerveux**, TA **plexus 2 plexus**, **plexus veineux**, TA **plexus venosus** ◇ **1 plezhad** b. **2 rouedad** b. 1 Daskroaziad skourroù nerval, ar re bennañ o vezañ ar *p. a-livenn* (Gl. *p. spinaux*, anvad kent : *p. nerveux rachidiens*), anezho : *p. ar gouzoug*, *p. ar vrec'h*, *p. an dargreiz*, *p. ar poullkreuz*, *p. ar belost*. 2 Daskroaziad gwazhiennoù bezant en holl lec'hioù eus ar bevedeg; d'ar re bouezusañ ez eus bet roet un anvad, sk. : *rouedad karotidel diabarzh* (TA *plexus venosus caroticus internus*, Gl. *plexus carotidien veineux*).

NOTENN : Ne hañval ket vezañ unvan an destlad PNA, an destlad TA hag an termennoù arveret gant an aozerion evit a sell anvadur ar plezhadoù nerval ha gwazhienedel ; da skouer, alies e vez graet gant Gl. *plexus e-lec'h plexus nerveux*. Betek gouzout, e kinnigan adkemer an termennoù embannet war GEGO II, eleze *plezhad* a-dal da *plexus nervosus* ha *rouedad* a-dal da *plexus venosus*.

plexus myentérique, TA **d'Auerbach** ◇ **plexus myentericus**, **Auerbach's plexus** ◇ **plezhad pervezkaherel**, **plezhad Auerbach** Plezhad simpatek ha parasimpatek loet etre daou welead kigennele ar pervez, o tasperzhiñ en amdonnegezh.

plis palmaires : **syndrome des ~** ◇ **xanthoma striatum palmare** ◇ **azoniad plegoù ar palv**, **ksantom** g. **rizennek ar palv** Seurtad ksantom plaen oc'h anadiñ e rezh linennoù orañjez, loet war blegoù ar palv hag ar bizied.

plis palmés, **arbre de vie du col**, TA **plicae palmae cervicis uteri** ◇ **palmate folds** ◇ **plegù diskalfet gouzoug ar grozh** Asplegù reol war enkrozhenn ar gouzoug stalet e rezh ur "wezenn vuhez".

pli (-), (-) **plíc-**, (-) **pliqu-**

- *aorte plicaturée* kilwe an aortenn • *aspect plicaturé de la langue* irviégezh an teod • *complié (comportement)* ardaouek
- *implicite* emleg • *impliqué (dans)*, *intervenant (dans)* dasperzhiat (en) • *lame repliable* lavnenn eilplegadus • *langue plicaturée* teod plegaouek • *pachydermie plicaturée* troc'hgenn irviak • *pli courbe* troenn gognek • *pli radié de l'anus* pleg saezhennus ar fraezh • *repli cutané* aspleg kroc'hen • *repli sur soi*, *retrait* emdenn • *repli semi-lunaire* pleg kornloarek • *repli, cul-de-sac* aspleg
- *se compliquer*, *complication* rouestlañ, rouestlad • *se replier sur soi-même* emdamolodiñ • (*se*) *répliquer*, *réplication* azeilañ, dasparañ.

plomb ◇ **lead** ◇ **plom** g. Elfenn gimiek, arouez Pb, niverenn atom 82, metal amzaralladus en aer, blot hag aes da c'houzelviñ ; dañjerus eo euvriñ kediaoù ar *p.*, ha pistrusoc'h c'hoazh o dewentañ e rezh uloc'h pe vurezh ; e-touez dañjerusañ deveradoù ar plom emañ ar c'harbonat bazek pe *gwenn plom* (Gl. *céruse*), livegenn bet arveret er penturioù, berzet e zanveziñ abaoe ar bloavezhioù 1950, hag ar *plom tetraetil*, distaraner a ouzhpenned d'an treslokoù, dilezet ivez hiziv (sl. *colique de plomb*, *saturnisme*).

plomber ◇ **to fill** ◇ **barrañ**, **barrleuniañ**, **plomañ** Leuniañ ur gavenn gleñvedel nad eo ket evit steuziñ emdarzh, sk. : *barrañ un askorn*, *barrañ pe plomañ* un dant ; ebarzhiñ un danvezenn galet, andaralladus en ur gavenn galvezadel a venner derc'hel skaret ar speurioù anezhi, sl. : *peurleuniañ ar gavenn devoudet gant ar c'hernezglenañ* (sl. *apicolypse*, *obturation 2*).

plombémie ◇ ◇ **plomwadvec'h** g. Feur ar plom er gwad, reol dindan 1 µmol/l.

Plummer-Vinson : **syndrome de ~** ◇ **Plummer Vinson syndrome** ◇ **azoniad Plummer-Vinson** Seurtad amwad uslivele hennadek o tizhout ar plac'h e tro he fergont vloaz, naouus dre ur c'houezh kalzek eus feur an houarn er gwadveiz, un darallad eus an amwiskadoù, ar faner hag ar glourgennoù koazhadel, ur bronkon laurus kriz, un isteñv eus glourgenn ar stomok gant aklohidriezh ; alies e tedro etrezek kankr ar c'houc'hargadenn hag an treizher.

pneumallergène ◇ **pneumallergen** ◇ **analallergen** g. Danvezenn en araez da zec'han erwezhoù allergek (a rizh darwalladel) e par ar benvegad analañ (astma, sifern ar bleuñv, h.a.) ; ar re voutinañ anezho zo an uloc'h, an akar, ar pluñv, ar pollen, blev al loened ti.

- pneumarthrographie** ◇ **pneumarthrography** ◇ **arzluniñ aezhennel, aezhennarzluniñ** Skinluniñ ur c'henvell goude ensinklañ aezhenn en irgenn anezhañ.
- pneumarthrose** ◇ **pneumarthrosis** ◇ **arzaezhañ, arzaezhad** g. Bezañs aezhenn e-barzh irgenn ur c'henvell, a-zarvoud (da heul ur gouli) pe gwezhiet e sell d'ur skinluniñ.
- pneumatisation** ◇ **pneumatization** ◇ **aergavennañ** Argerzh neuztarzhel, dinodiñ ur gavenn aezhel en ur rannbarzh korfadurel, sk. : *aergavennañ adparzhioù ar skouarn grenn* (Gl. *pneumatisation des cavités annexes de l'oreille moyenne*).
- pneumatocèle** ◇ **pneumatocele** ◇ **aezhvozhell b.** Yoc'henn aezhel e dianlen ur fregadenn e parenkim ar skevent, daraezien pe, a-wechoù, a orin emfizematus.
- pneumatocèle du crâne** ◇ **pneumatocele cranii** ◇ **aezhvozhell a-glopenn** Fennad aer e-barzh kavenn ar c'hlopenn etre an amaskornenn hag an eskern (endan-dev pe war-dev) pe enempennel zoken, devoudet gant treloezadur emdarzh pe daraezel kevioù an tal pe kelli ar vrennigenn; anv a ra aozerion 'zo eus *aezhvozhell glopenn-empenn daraezien* (Gl. *pneumo-encéphalocèle traumatique*) (sl. *pneumocrâne*).
- pneumatocèle parotidienne** ◇ **glass blower's mouth** ◇ **aezhvozhell ar gilvoc'henn, bozhell ar c'hwezherion wer** Usvoll sanioù degorzhañ ar gilvoc'henn hag isteñv parenkim ar wagrenn a stader war ar c'hwezherion wer.
- pneumatocèle pulmonaire** ◇ **pneumatocele** ◇ **aergleuzenn b. a-skevent** Enloezad o tarvezout e-barzh parenkim ar skevent da heul ur poread lemm pe goulemm diwar stafilokok, argemmus ar skeudenn skinourel anezhi eus un deiz d'egile.
- pneumatocèle vaginale** ou **scrotale** ◇ ◇ **aezhvozhell ar c'houinsae pe ar gousac'h** Dardennad ar c'houinsae gant aezhennoù, rouestlad a 'r wadvozhell.
- pneumatose intestinale** ◇ **intestinal pneumatosis** ◇ **aezhadezh g. a-bervez** Stroll kistoù aezhel bihan bezant e diabarzh speur ar pervez, en araez dre o niver da zec'han un argaledad kantet, leteñvel ouzh un anaf kankrel.
NOTENN : Gl. *pneumatose*, termen en arver gant mezeion an 18t kantved da arouezñ bezañs ezreol un aezhenn e-barzh an organoù, ar ganol vezhur pergen.
- pneumaturie** ◇ **pneumaturia** ◇ **troazhaezhad** g. Dezioulañ aezhenn a-vesk gant an troazh, oc'h azonañ peurvuiañ ur c'hehented etre ar forzhioù troazhañ hag ar pervez.
- pneumectomie, pneumonectomy** ◇ **pneumectomy** ◇ **skeventezvenañ** Dazbidañ ul lodenn bras pe vrasoc'h eus ar skevent pe ur skeventenn en he fezh, gwezhadenn graet e degouezhioù 'zo a dorzhellegezh, a gankr pe a linadur bronkezskeventel.
- pneumoallergologie** ◇ **pneumoallergology** ◇ **skeventallergologiezh b.** Studi anezhoù ar benvegad analañ a orin allergek.
- pneumobilie** ◇ **pneumobilia, aerobilia** ◇ **bestlaezhad** g. Bezañs aezhenn er forzhioù bestl; termenou nes nebeut arveret : Gl. *pneu-mocholangie (bestlforzhaezhad)* Gl. *pneumocholécystie (bestlgellennaezhad)*.
- pneumoblastome** ◇ **pulmonary blastoma** ◇ **blastom g. skevent, pneumoblastom g.** Yoc'henn skevent a orin krouellel (sl. *blastome*).
- pneumocèle** ◇ **pneumocèle** ◇ **skeventogad g.** Erdourzhad un tamm skevent dre un ode e speur ar bruski; notañ e vez alies treuzarveret Gl. *pneumocèle* e-lec'h Gl. *pneumatocèle*.
- pneumocéphale, pneumocéphalie** ◇ **pneumocephalus** ◇ **pennahezhad** g. Termen oc'h arouezñ, ouzhpenn ur vezañs aezhenn e-barzh kavenn ar glopenn (sl. *pneumocrâne*), un emfizem amglopennel.
- pneumococcémie** ◇ **pneumococcemia** ◇ **pneumokoklestegezh b.** Gwadlestegezh devoudet gant ar pneumokok.
NOTENN : Kounaat e voe kendivizet lezel hep kemmadur an amprestoù gresianek o teraouiñ dre an elgenonennoù *pn-*, *ps-*, h.a. En dro-mañ, da skouer, skrivañ : *ar pneumokoklestegezh*.
- pneumococcie** ◇ **pneumococcosis** ◇ **pneumokokiezh b.** Teskad an darvoudoù kleñvedel diwar ar pneumokok.
- pneumocolie** ◇ **pneumocolon** ◇ **kolonaezhad g.** Bezañs aer hag aezhennoù goerezh e-barzh ar c'holon (sl. *aérocolie*).
- pneumoconiose** ◇ **pneumoconiosis** ◇ **analeuflegezh b.** Teskad ar strafuilhoù bronkezskeventel diwar dewentañ a-leizh hag alies eufl meinell pe vevel (hue), andalet o grevusted a-geñver gant pistrigezh an eufl ha/pe skorted an argerzhioù karzhañ analadel; peurvuiañ e lakaer kemm etre 1) an *a. kalzennel* (Gl. *p. de surcharge*), kuñv a-walc'h, naouus dre un daspugnadur rannigoù anniñv, 2) an *a. fibroseiat* (Gl. *p. fibrogène*), grevus, diwar ur mod ervezhiañ fibrozel emledus ouzh uloc'hioù silika ha silikatou, 3) an *a. kemmesk* (Gl. *p. mixte*), grevus kenan, o kevredañ an daou argerzh; er pleustr ez anver *a.* an dewenterezh eufl meinell ha, da arouezñ ar c'heuziadoù dre eufl bevel, e reer gant *analuzoregezh* pe *skeventad diwar zewentañ antigenoù bevel* (Gl. *pneumopathie par inhalation d'antigènes organiques*).
- pneumocoqueluche** ◇ **pulmonary whooping cough** ◇ **drev g. skeventel** Furm skeventel a 'n drev, naouus dre an trec'hwez, ronkoù bouilhek fin ha puilh (bronkezfzo brigerek) hag ur gourellimfokit (Gl. *hyperlymphocytose*) (sl. *bronchite capillaire, coqueluche*).
- pneumocrâne, pneumoencéphale** ◇ **pneumocrania** ◇ **empennahezhad g.** Fennad aer e-barzh kavennoù ar c'hlopenn (endan-dev, endan-gevnidek, enkambrel); *e. kalvezadel* (Gl. *pneumoencéphale artificiel*), *e. dewerc'h*et dre ensinklañ aer e-barzh kanol ar mellkein en amkan un imboure'hiñ (empennluniñ aezhennel, kambrluniñ) pe ur prederiañ (war-benn fregañ glenelloù er pilhon, hentenn dilezet) (sl. *encéphalographie*).

pneumocystographie ◇ **pneumocystography** ◇ **c'hwezhihelluniñ aezhennel** Skinluniñ ar c'hwezhihell bet leuniet gant aer goude enberadiñ enni un Xdemerenn o valzenniñ a-stok ouzh an epitelienn naouedek ha, dre se, o lakaat a-wel an anafoù.

pneumocytes ◇ **pneumocytes** ◇ **pneumokit** s. Kelligoù epitelel o pallennañ al logigoù skevent; ar paotañ eo ar *c'helligoù logigel bihan* (pe *p. a rizh I, p. kennel, Sz. membranous p.*); ar *c'helligoù logigel bras*, anvet c'hoazh *kelligoù Clara* (pe *p. a rizh II, p. greunek, Sz. granular p.*) o vorc'hañ ur gorrewezher.

pneumolithe ◇ **pneumolith** ◇ **skeventvaen** g. (l. : **skeventvein**) Fetisaenn sonnel bezant a-wechoù e-barzh parenkim ar skevent.

pneumologie ◇ **pneumologie** ◇ **analadouriezh** b. Studi ar benvegad analañ hag e gleñvedoù.

pneumomédiastin ◇ **pneumomediastinum** ◇ **poullkreizaezhad** g. Fennad aezhenn e-barzh an esaouiou kellaouek ar poullkreiz; gwechall e veze amparet dre ensinklañ aezhenn war-benn haenluniñ organoù ar poullkreiz, kalvezder imboure'hiñ anvet *p. kalvezadel* (Gl. *p. artificiel*) pe *poullkreizluniñ aezhennel* (Gl. *médiastinographie gazeuse*).

pneumomètre ◇ **pneumometer**, **pneumatometer** ◇ **pneumometr** g. Ardivink amkanet da vuzuliañ gwask an aer enanalet hag ec'hanalet.

pneumonie à cellules géantes de Hecht ◇ **Hecht pneumonia** ◇ **skeventfo g. gant keurgelligoù Hecht** Skeventfo viruzel marvus o tarvezout gant ar vugale, naouus ent neuziadurel dre vezañs keurgelligoù e-barzh ar skevent, a stader e meur a viroz, en o zouez ar ruzell.

pneumonie de déglutition ◇ **deglutition pneumonia** ◇ **skeventfo diwar stonkañ** Poread bronkez-skevent devoudet gant an tremen eus drailhennoù boued ebarzh ar forzhioù analañ (sl. *Mendelson : syndrome de ~*).

pneumonie interstitielle desquamante ◇ **desquamative interstitial pneumonia** ◇ **skeventfo gourc'hennadel ent-remezel** Azoniad dibaot, dianav e arbenn, naouus, *ent neuziadurel*, dre ar vezañs eus kelligoù logigel greunek bras e rezh plakadoù o leuniañ logigoù ar skevent, ar speurioù etrelogigel o chom reol pe dost; *ent klinikel*, dre un teskad arouezioù (tre-c'hwez, paz) heñvel ouzh re fibroziou ar skevent (sl. *fibrose pulmonaire intersitielle diffuse*); anaev gwellaet, pareet zoken, gant ar c'haengurañ.

pneumonie interstitielle à Pneumocystis carinii, pneumocystose ◇ **Pneumo-cystis pneumonia** ◇ **skeventfo diwar Pneumocystis, pneumokistoz** g. Skeventad grevus kenan, kiriek dezhañ ur brotozoenn, o tarvezout gant rakkoulzeion 'zo pe gant klañvourion an haza er stad a zivig hangaeel e-kerz ur prederiadur dre an hangaealsterioù; erzerc'hañ a ra dre ur skorted analadel lemm ha terzhiennek ha, war ar skinlunioù, un ensiladur rouedek-nozelek (sl. *carence immunitaire, immunodépresseur*).

pneumonie lobaire ◇ **lobar pneumonia** ◇ **skeventfo tolbezennel** Pore kiriek dezhañ ar pneumokok goafheñvel uzennel (*Streptococcus pneumoniae*), naouus, *ent neuziadurel*, dre un danijenn lemm o wazhañ un dolbezenn skevent en he fezh (avuegañ unneuziek) hag un naouezenn fibrinek o leuniañ al logigoù; *ent klinikel*, dre un dedro kerek o padout etre 5 ha 9 devezh, adalek ur gridienn deroù trumm ha *solemn* (Laennec) betek un diwresteriñ herrek (sl. *déferescence, hépatisation*).

NOTENN : Anvad klok ar c'hleñved : *skeventfo frank, lemm, tolbezenn, fibrinek diwar pneumokok* (Gl. *pneumonie franche, aiguë, lobaire, fibrineuse à pneumocoques*) a ya d'ar furm *skeventfo tolbezennel* (Gl. *pneumonie lobaire*) en testennoù ha da *skeventfo* (Gl. *pneumonie*) er c'haozeeg. En eneb, unster e van Sz. *pneumonia*, intentet "tanijenn e parenkim ar skevent" hepmuiken.

pneumopathie ◇ **pneumopathy** ◇ **skeventad g., skeventanaev** g. Anvad genadel klañvadurioù ar skevent.

pneumopathie immunologique ◇ **hypersensitivity pneumonitis** ◇ **skeventad hangaeel, skeventad diwar dreistkizidigezh** Kleñved micherel diwar erwezh allergiek ar skevent ouzh un antigen a orin bevel peurliesañ; boutin etre an holl furmoù s. *h. e stader a*) un dedro dre resmiadoù lemm, gant terzhienn, trec'hwez, gwadskopadoù, o vont gwechoù 'zo betek ar fibroz entremezel strewek; *b*) un arvez skinourel rouedek-nozelanek, strafuilhoù argrennadel an arc'hwel analañ gant isfu logigoù-korrwazhied (sl. *bloc alvéolocapillaire*); *c*) ur granulom strewek keurgelligel hag epitelioidel eus gwiad entremezel ar skevent; *d*) bezañs anti-korfou dierc'heiat er gwadvez (sl. *immunoprécipitation*) naouus d'an erwezhoù dreistkizidigezh damzaleet (anadenn Arthus); a du 'rall e noter devoudoù a ra gousellout un erwezh dreistkizidigezh kellighandizhek daleet (sl. *hypersensibilité 2*); e-touez an anaevioù-se e renker : skeventad ar verourion (sl. *poumon de fermier*), ar c'honiosporioz (anvet ivez *kleñved an diruskerion skav-gwrac'h, Sz. maple bark disease*), ar bagasoz (sl. *bagas-rose*), ar suberoz (sl. *suberoz*), kleñved an hinaozerioù, hag an anaevioù diwar dewenterezh mogedoù, burezhioù, hueadoù, uzorioù (foue, malt, prenn, sizal, kafe, te), fank loened (sl. *éleveurs d'oiseaux : maladie des ~*).

NOTENN : Da arouezañ dre ul lavar resis stadoù an euhl en aergelc'h, e kinnigan arverañ an termennoù-mañ : *euhl* s. (rannigoù munut danvez sonnel pe liñvel), *hue* g., (*poultr* g. & s. pe *glizh* g. & s.); *uloc'h* g. (hue meinel); *uzor* g. & s. (hue struzhel); *hueañ, euflennañ* (lakaat e poultr pe e glizh, Gl. *pulvériser*); *difruañ* (lakaat ul liñvenn e glizh, Gl. *pulvériser, atomiser*); *hueek* aa. (er stad poultr, Gl. *pulvérulent*).

pneumopéricarde ◇ **pneumopericardium** ◇ **amgalonennaevzhad** g. Fennad aezhenn e-barzh an amgalonenn, peurliesañ da heul ur gouli er brusok o reiñ digor d'an aer, a-wechoù rouestlet gant ur fennad liñvel : levruzenn, gwad, lin (*amgalonennfoeñv-aezhad, -wadaevzhad, -linaevzhad* Gl. *hydro-, hemo-, pyopneumopéricarde*).

pneumopéritoine ◇ **pneumoperitoneum** ◇ **ampelennaevzhad** g. Fennad aezhenn en ampelenn, emdarzh a-wechoù, d'an aliesañ gwezhet en amkan un imboure'h luc'h-pe skinwerañ.

- pneumopexie** ◇ **pneumopexy** ◇ **skeventAanlenañ** Festañ ur skeventenn ouzh speur ar brusk, embreget goude ur gwezh surjaniel war ar skevent kuit a grezennandiñvañ (sl. *pleurodèse*), evit he lakaat en araez da ademledañ.
- pneumoséreuse** ◇ **pneumoserosa** ◇ **levrgennaehzhad** g. Fennad aezhenn en un irgenn pe e levrgenn ur flugezenn, emdarzh, pe gwezhiet en amkan un imboure'h skinourel pe ur prederiañ (sl. *pneumo-péritoine, pneumothorax*).
- pneumotachographe** ◇ **pneumotachygraph** ◇ **analgaswezer** g. -ioù, **pneumotakigraf** g. -où Ardivink amkanet da lerc'hwezañ an ec'hongasoù gwentadurel.
- pneumotachographie** ◇ **pneumotachygraphy** ◇ **analgaswezañ** Lerc'hwezañ ec'hongasoù gwentadurel ar skevent (Gl. *débit ventilatoire des poumons*).
- pneumotaxique** : **centre** ~ ◇ **pneumotaxic center** ◇ **kreizenn** b. **heudenanal** Bodad nervgelligoù loet er pont a zo o gwered skoilhañ ouzh an enanalañ (sl. *apneustique* : *centre* ~).
- pneumothorax** ◇ **pneumothorax** ◇ **bruskaezhad** g. Fennad aezhenn emdarzh pe gwezhiet e-barzh kavenn ar c'hrezoù ; unan eus prederiadurioù an dorzhelegezh en 20t kantved e voe ar *goustougurañ* (sl. *collapsothérapie*) dre araez ar *b. kalvezadel* pe *yac'hadel* (Gl. *p. arti-ficiel* pe *thérapeutique*), hentenn bet dilezet da heul donedigezh ar bevastalerioù ; etre 1935 ha 1955 e voe arveret ur c'halvezder yac'hadel all pa veze glenelloù o virout a zewerc'hañ ur bruskaezhad etre-krezoù, anezhañ ar *b. emaez krezoù* (Gl. *p. extrapleural*) a amplege dispegañ feilhenn speurel ar grezenn (sl. *adhérence*).
- pneumothorax idiopathique bénin, pneumothorax des conscrits** ◇ **simple pneumothorax** ◇ **bruskaezhad hennadek kuñv** b. o tarvezout gant tud yaouank yac'h a du 'rall hag o parañ hep arlenad, kiriek dezhañ fregadur ur c'hwezigen emfizem skevent pe ur c'hist aezhel enkrezenneel (sl. *bleb*).
- pneumothorax suffocant** ou **à soupape** ◇ **valvular pneumothorax** ◇ **bruskaezhad migus** pe **klapedek** Seurtad bruskaezhad emdarzh o tisoc'h eus ur c'hehentad skevent-krezenn o lezel an aer da enteñ er gavenn etre-krezoù gant an enanalañ hag o herzel outañ a ezteñ gant an ec'hanalañ.
- pneumotomie** ◇ **pneumotomy** ◇ **skeventenbenañ** Flañchadenn graet er skevent en un amkan yac'hadel, da skouer karzhañ ur pugnez henek.
- pneumotrope** ◇ **pneumotropic** ◇ **skeventkerc'h** aa., **skeventkerc'hus** aa. O lenañ ent hanbarek ouzh ar skevent.
- pneumotympan** ◇ **pneumotypan** ◇ **taboulinaezhad** g. Bezañs aer war voustr e-barzh ar skouarn grenn, darvoud kuñv peurliesañ, boutin er sifern, oc'h erzerc'hañ trumm dre ul laur gwanus o tarvezout en ur skouarn pa striver da c'hwezhañ ar fri, anezhañ bouzarder, boudinell hag, a-wechoù, trolern.
- Pneumovirus** ◇ **Pneumovirus** ◇ **Pneumovirus** Genad nemetañ eus kerentiad ar *Pneumoviridae*, gougevret outañ ar *viruz analadel sinkitel* (sl. *virus respiratoire syncytial*), kiriek d'an darn vrasañ eus skeventadoù ar vugale.
- poche des eaux** ◇ **bag of waters** ◇ **sac'h** g. **an dour** En amiegouriezh, anvad a lakaer war ar balir graet e-barzh ar gouin gant lienennoù ar vi, pa vez frankaet gouzoug ar grozh.
- podagre** ◇ **podagra** ◇ **1 gwendr** g. **2 gwendrek** **3 gwendreg** g. -eion 1 Erzerc'hadenn a 'n urloù, e par kenvelloù an treid pergen. 2 Gant ar gwendr. 3 Gouziviad ar gwendr.
- NOTENN : Dispredet eo an termenou gallek ha saoznek ; menegiñ a ran an termenou brezhonek, e ken kaz ma vennfed menegiñ a-ziforc'h tizhad an treid.
- podo-orthésiste** ◇ **podoorthesist** ◇ **troadsteudeller** g. -ion Oberier boteier troadeunadel (*troadsteudelloù*, Gl. *podo-orthèses*).
- podocytes** ◇ **podocytes** ◇ **podokit** s. Kelligoù epitel bloueigoù al lounezh.
- podographe** ◇ **podograph** ◇ **solwezer** g. -ioù, **podograp** g. Ardivink amkanet da louc'hwezañ ar solioù (*solwezadoù*, Gl. *podogrammes*).
- podologie** ◇ **podology** ◇ **troadouriezh** b. Diskiblezh o plediñ gant an troad hag e gleñvedoù.
- podologue** ◇ **podologist** ◇ **troadour** g. -ion Eiler mezege arbennikaet war anaezioù an treid, o ren dre hentennoù antrewan imboure'hioù (louc'hwezadoù) ha prederiadoù korfeunerezh ; war steuziañ emañ an diforc'h etre *troadaezour* (sl. *pédicure*) ha *troadour* dre ma tenn an embregerion da vezañ perzheget en ur ser war an div ziskiblezh.
- podoscope** ◇ **podoscope** ◇ **solseller** g. -ioù, **podoskop** g. Ardivink amkanet da arseliñ ar solioù hag ar gorreadoù harpañ anezho, ouzh e ober ur melezour a-zremm loet dindan ur werenn a-zremm ivez, ma teu warni ar gouziviad en e sav.
- podostatigramme** ◇ **podostatigramme** ◇ **solwasklunad** g. -où, **podostatigramm** g. Seurtad sollunad o reiñ kel eus ar gwaskoù e pep poent eus gorread harpañ ar sol (sl. *photopodogramme*).
- pogonion** ◇ **pogonion** ◇ **pogonion** g. Poent balirekañ an elgezh war an dalenn diasaezh.
- poignet** ◇ **wrist** ◇ **arzorn** g. -ioù d. : **daouarzorn** Rann a 'n ezel krec'h etre an arvrec'h hag an dorn, an eizh askorn anezhi (sl. *carpe*) o parzhiañ er *c'henvell gwerzhid-arzorn* (TA *articulatio radiocar-pea*, Gl. *articulation radiocarpienne*).
- poïkilocytose** ◇ **poïkilocytosis** ◇ **poïkilokitoz** g., **daskenneuz** g. **an hemati** Distummadur ar c'helligoù ruz e lies furn : perenn, bataraz, paliked, h.a.

poikilodermie ◇ **poikiloderma** ◇ **poikiloderma** g. Kroc'henad naoues, goude ur prantad darvoudoù leiek (kaherostoù, arz-ostoù, gouliñv damroz ar fas), dre ur marelladur milivegat, gwenn nakr e lec'hioù 'zo, roz pe teñval e lec'hioù all, gant isteñv an epiderm, usvoll korrwazhied an derm, an tachadoù darallet o vezañ stalet e plakennoù pe e rouedadoù; ar *p.* loet en dremm hag er c'herc'henn, pe *kleñved Civatte*, a dizh dreist holl ar merc'hed da vare ar paouez mizioù.

poikilotherme ◇ **poikilotherm**, **thermal conformer** ◇ **allwrezat** aa., **gwreazoler** aa. A-zivout al loened argemmus o gwrezverk, hemañ o vezañ e dalc'h hini ar metoù (sl. *équilibration, homéostasie, homéotherme*, La-17 366-367).

poils ◇ **hair** ◇ **blev** s. Faner ar bronneged; gant an den e vezont stank war ar c'hloppenn (briger) ha war ar fas (barv ha mourrou gourevel, divabrant en div rev), en divgazel hag er rannbarzh ganadel (sl. *cils, kératine, phanères*).

poing fermé : **signe du ~**, **signe de Claude** ◇ ◇ **arouez ar meilh dorn**, **arouez Claude** Dic'houested da beurserrñ ar meilh dorn, arouez eus seizi an nervenn greizer, war un dro gant arouezioù all : dic'houested da plegañ ha da geharpañ ar meud, da blegañ daou oefs diwezhañ ar biz yod hag ar biz kreiz.

point de contact ◇ **contact point** ◇ **poent** g. **stok** Gorreenn vihan m'emañ drezi un dant e diastok an dant kefin; da heul daralladur ar poentoù stok dre ar bruk, an dilec'hiañ pe an uzadur e chom drailhennoù boued gennet etre an dant, o tec'h anafoù foel ha laurus en amzantenn (sl. *desmodonte*).

point de rosée ◇ **dew poent** ◇ **glizhverk** g. Gwrezverk ma teraou glizhennadur ur vurezh war yenaat.

point orbitaire inférieur ◇ **orbital point** ◇ **poent izek ar pod** Poent dianaou eus ribl izelañ ar pod lagad.

pointe ◇ **sharp wave**, **spike** ◇ **pik** g. Elfenn eus an empennvarrwezañ, anezhi ul luskellad a heled bras (100 µV ha muioc'h), berrbad (etre 40 ha 60 ms), 3 hanrann ouzh he ober : o sevel, o tiskenn dindan ar *regenn geitredan* (sl. *ligne isoélectrique*) (pe *diazregenn*, Gl. *ligne de base*) hag o sevel en-dro; anadenn c'hrezvarrek, digevret pe arreat, oc'h erzerc'haat hegeuz ar bluskenn empenn; ar *p. gorrek* (Gl. *p. lente*), hiroc'h pad an trede hanrann anezhañ, a stader en droukfell ividig; ar *p. kernboent* (Gl. *p. vertex*), *p. gorrek* a heled bihanoc'h, a noter da geñver fraouadoù klevedel.

pointe-onde : **complexe ~** ◇ **spike and wave** ◇ **kemplezh b. pikbaot**, **pikbaot** g. Anadenn empennvarrwezadel gemplezh oc'h arreata gant un talm reoliek a 3 pe 3,5 dre eilenn, anezhi ur pik (0,08 s) heuliet diouzhtu gant ur wagenn volzek a heled damgevatal, gorrekoc'h (0,2-0,5 s), erzerc'had rizhek eus an droug bihan (Gl. *petit mal*), furm droukfell leiek (sl. *électroencéphalogramme, épilepsie généralisée*).

(-)**point(-)**, **ponct(-)**, (-)**punct(-)**

- *acné ponctuée, comedon* akne boentaouet, komedon • *acupuncteur* nadozwaner • *acupuncture* nadozwanañ, nadozwanerezh
- *apex, sommet, pointe* kern • *apparaitre, pointer* nodiñ • *appliquer l'électrode au point moteur* arloañ an elektrod er poent loc'hadel • *arrachement d'un muscle de son point d'attache* digrakañ ur gigenn diouzh he lec'h enlenañ • *aspect ponctué* dluzhadur
- *choc de pointe (cœur)* tos ar gem • *circulation pulmonaire d'appoint* amred skevent klokaat • *curiepointure* kuriwanañ
- *débitmètre de pointe* renngasventer • *électro-acupuncture, électropunc-ture* tredanwanañ • *éruption de points rouges lichénoïdes* dispuilhad pikoù ruz likenoidel • *galvanopuncture* galvaniwanañ • *issu de, à point de départ dans* evodet eus • *kératite ponctuée* kornsaefo dluzhet • *mettre au point le vaccin antisidéen* kevrikaat ar vaksin enephaza • *ondes T amples, pointues* gwagennoù T ampl, begek • *point, lieu, endroit, emplacement, espace* lec'hien • *mettre au point (optique)* hestiañ • *ondes en pointes triphasiques* gwagennoù pikek trilankadek • *perspective, point de vue* diarsell • *petite saillie marquée, au centre, d'un point noir* balirenn vihan gant ur pik du en he c'hreiz • *point d'ancrage* poent krap • *point d'appui* lec'hienn harpañ • *point d'ébullition* berhverk • *point d'émergence d'une source* strinklec'h un eienenn • *point d'ossification* poent askornaat • *point déclive* dianaou • *point de cassure* torboent • *point de côté* pistig • *point de fixation (vision)* poent steudañ • *point de fusion* teuzverk • *point en retrait de la peau* pukennig poentek e-barzh ar c'hroc'henn • *pointe du cœur* kern ar galon • *point isoélectrique* keitredanverk • *point lacrymal* poent an daerou • *point moteur* poent loc'hadel • *point nasal* poent friel • *polypointes, pointes-ondes* liespikou, pikbaotou • *ponction amniotique* amnionezwanañ • *ponction-biopsie* bevsav dre ezwanañ • *ponction diamétrique du sinus maxillaire* ezwanañ treuzode kev ar garvan • *ponction lombaire* ezwanañ a-loan • *ponction sternale* ezwanañ klerenn • *ponctionner le sang veineux* ezwanañ ar gwad eus ar wazhienn • *sensation punctiforme* santadur poentek • *suc ganglionnaire obtenu par ponction* sug ezwanet eus ur werblenn • *trépanoponction* trepanañ-ezwanañ.

poison ◇ **poison** ◇ **kontamm** g. Nep danvezenn gimiek en arez da skoilhañ ouzh arc'hwelioù ur gwriad, un organ pe da zevoudañ ar marv.

Poland : **syndrome de ~** ◇ **Poland syndrome** ◇ **azoniad Poland** Teskad kammneuziadoù dibaot a 'n ezel krec'h, dehou peurliesañ, o tizhout an dorn dreist holl : dornished, kensoutadur ar bizied (*bizanskar*, sl. *syndac-tylie*), berded pe ezvezañs eil oefs ar pevar biz diwezhañ ha, dibaot, isteñv an 2^l, 3^e ha 4^e biz, kroc'henrezhioù ezreol (sl. *dermatoglyphe*); ivez isteñv an arvec'h hag ar vrec'h ha dreist holl iswe an hordenn klerenn-kostou eus kigenn vras ar brennid; e kevarguz emañ orin hilel seurt kammneuziadoù; an arbenna anezho a ve ur strafuilh e diorreadur ar rizhell.

polaire ◇ **polar** ◇ **1 a-vlein**, **bleinel** aa. **2 bleinek** 1 A-zave d'ur blein, sk. : *ferennlug a-vlein* (sl. *cataracte polaire*), *hingleñvedouriezh vleinel* (sl. *climatopathologie*). 2 o piaouañ ur blein pe bleinoù.

polarité ◇ **polarity** ◇ **bleinegezh** b. 1 Naouuster ul luniad a zo dezhañ daou *vlein* (sl. *pôle*). 2 (Rizhelloniezh) kemmoù en amparadur ur vi pe un eginenn derezataet hervez un ahel, pennañ parenn an neuztarzh (sl. *morphogenèse*), sk. : *bleinegezh ar vigellig, bleinegezh eginenn un ezel*. 3 (Kelligouriezh) bezañs en ur gellig eus luniadoù pe arc'hwelioù kevarall, lec'hiet a-gevenep.

pôle ◇ **pole** ◇ **blein** g. -où Eizhaenn eus ul luniad pe un trevnad jedoniell, fizikel, bevedel, buhezel, naouus dre ur perzh dibarek. NOTENN : E degouezhioù 'zo e vez arveret, evel kenster da *blein*, an termen *penn ahel*, kinniget gant Le Gonidec evit an douaroniezh en e *Dictionnaire Français-Breton* eus 1847.

pôle animal (de l'œuf) ◇ **animal pole** ◇ **blein** g. loenel (a 'r vi) Parzh eus ar vi ma c'hoarvez mitoziou an azvedigezh ha ma paota ar c'hitoplasm (sl. *vitellus*).

pôle végétatif (de l'œuf) ◇ **vegetative pole** ◇ **blein struzhel (a 'r vi)** Parzh eus ar vi loet a-gevenep d'ar blein loenel, paot ennañ ar c'hadoan.

policlinique ◇ **policlinic** ◇ **poliklinik** g. 1 Klinik ma c'hougorer kuzuliadennoù hag arouelioù baleadel da annezidi ur gêr, sammet gant an dinaz lod eus ar mizoù merañ anezhañ. 2 Diazevadur (prederva dinazel) ma vez degemeret klañvourion na herberc'hier ket ha ma stummer studierion (sl. *polyclinique*).

NOTENN : War ergemenn *Aozadur Bed ar Yec'hed (WHO)* eo bet dilezet an deavadur Gl. *policlinique* en askont d'an heñveloniezh gant *polyclinique*. An daou dermen gallek kinniget d'e amsaviñ n'int ket kenster : a) *Service de consultation externe (Rann guzulian diavaez)*, o talvoud kement ha "gwazrann glañvdi", b) *Dispensaire de soins, (Prederva, sl. dispensaire de soins)*.

polioencéphalite ◇ **polioencephalitis** ◇ **louedempennfo** g. Tanienn steuñvenn louet an empenn : pluskenn, gronnoù an diaz, gronnoù louet ar c'hef empenn ; l. *lemm pe goulemm* (Gl. *p. aiguë pe subaiguë*), o tarvezout da heul poreoù diwar virus nervgerc'h (louetvelfo, difteriezh, skarlegenn, h.a.) pe pistriadoù (alkool, plom), erzerc'hat, ent klinikel, dre an arluz, an enkreuz pe ar morvor, seizi an nervennoù ponthirvelel ; l. *henek*, oc'h erzerc'hañ dre ur seizi a 'n nervennoù ponthirvelel, o tedeñ gorrek, devoudet gant ar sifiliz pe ur pore diwar virus nervgerc'h (sl. *Gayet-Wernicke : encéphalopathie pe maladie de ~, ophtalmoplégie nucléaire, paralysie bulbaire aiguë de Leyden, paralysie labio-glosso-pharyngée*).

poliomyélite ◇ **poliomyelitis** ◇ **louetvelfo** g. Tanienn steuñvenn louet ar mel a-livenn ; l. *araok lemm* (Gl. *p. antérieure aiguë*), tanienn kerniel araok ar mel a-livenn (sl. *corne antérieure : syn-drome de la ~, Heine-Medin : maladie de ~, téphromyélie*) ; l. *adreñv* (Gl. *p. postérieure*), tanienn kerniel adreñv ar mel a-livenn (sl. *zona*).

poliomyélite antérieure chronique ◇ **chronic anterior poliomyelitis** ◇ **louetvelfo araok henek** Distruj gorrek hag argammedek ar c'helligoù eus kerniel araok ar mel alivenn, o tec'han un dedroadur gorrek kenan eus isteñv ar c'higennoù (sl. *Werdnig-Hoffmann : amyotrophie de ~*).

poliomyélite antérieure subaiguë ◇ **subacute amyotrophia of medullar origin** ◇ **louetvelfo araok goulemm** Kaheristeñv diwar wazhad ar mel, o tedeñv etrezek ar marv a-benn un nebeut mizioù ; deraouiñ a ra e par an daouarn (isteñv a rizh Aran-Duchenne) ha diraez a-nebeudoù an arvec'hioù, an izili traoñ (dre o eizhaennoù), ar c'hef, ar gouzoug, a-gevret gant gwiengneghadoù, ervezh dic'henezhadur ha strafuilhoù bras gwzhiedloc'hadel ; dre dizhad an hirvel e tarvez ar andizh (sl. *dégénérescence : réaction de ~*).

poliose ◇ **poliosis** ◇ **polioz** g., **louedni** g. Dislivad ar blev ; hervez aozerion, dislivad betek al louet eus an holl vlev ; hervez re all, dislivad ul lijorenn hepken eus ar gwaout (sl. *canitie*).

poliovirus ◇ **poliovirus** ◇ **poliovirus** g. Viruz al louetvelfo araok lemm ; gougevret eo ar spesad *Poliovirus* ouzh ar genad *Enterovirus*, kerentiad ar *Picornaviridae* ; hervez ar rannvedoù ez eus bet hennadet tri rizh antigenel *p.* kiriek d'al louetvelfo ; an den eo ar mirva virus, hemañ oc'h enteñ dre ar forzhioù koazhadel hag o tiraez an nervahel dre ar gwad pe dre hent ar gwiennnoù nervel ; seurtadoù 'zo a *p.* ne zevoudont nemet poreadoù dianat pe kuñv (fric'hargadenno).

pollakiurie ◇ **pollakiuria** ◇ **dezioulata** Troazhañ re alies, hep ma vez dre ret reñverek ec'honad hollel an troazh borc'het dre 24 h, arouez al lounezho entremezel pe un darallad c'hwezhiell-raksavenn (sl. *miction, néphrite interstitielle, prostatisme*).

pollicidigitale : préhension ~ ◇ **thumb-index grasp** ◇ **gavael** g. **meudbizied** Gevel furmet gant ar meud keharpet ouzh ur biz all.

pollicisation ◇ **pollicization** ◇ **meutaat** Oberatadenn amkanet da amsaviñ ar meud gant an eil askorn kreizdorn ha dilerc'h ar biz yod pa vez ambidet ar meud en e bezh.

pollinose ◇ **pollinosis** ◇ **pollinoz** g. Teskad an erzerc'hadoù ezreol o tarvezout da geñver keraezad ar pollen ouzh ar glaourennoù, bet eraozet ent spesadel, eus ar fri, ar gevresae, ar bronkez (sl. *anaphylaxie, asthme, atopie, coryza spasmodique*).

pollution ◇ **pollution** ◇ **1 saotrañ, saotradur 2 sperverañ, sperveradenn** b. 1 Eueriñ ur metoù naturel, un danvezenn pe ur boued gant aozadoù pistriek pe gant hadennoù kleñvedus. 2 Deroñ e-maez kemperzh revel, da geñver dezioulañ, kac'hout pe dre ar c'houk (*sperverañ lezhunadel*, Gl. *pollution nocturne*).

Polya : opération ou **procédé de ~** ◇ **Polya gastrectomy or operation** ◇ **gwezhiadenn Polya** Kreuzzevnañ darnel gant dasforzhañ penn-ouzh-penn kreuz-yunegenn.

polyadénomatoze ◇ **polyadenomatosis** ◇ **poliadenomatoz** g. Kleñved naouus dre ar vezañs eus adenomou e-barzh lies gwagrenn.

polyadénome, adénome multiglandulaire ◇ **polyadenoma** ◇ **poliadenom** g., **adenom** g. **liesgwagrennel** Bezañs adenomou e lies gwagrenn a un natur.

polyadénome gastrique diffus ou **en nappe** ◇ **Ménétrier disease** ◇ **poliadenom** g. **strewek** pe **ledadek** ar c'hreuz, **kleñved Ménétrier** Seurtad kreuzfo dibaot, naouus dre ur gourusvent eus plegoù glaourenn ar stomok hag usteñv ar gwagr-

ennoù glaourvorc'hus, gwisket ganto a-wechoù neuz gwagrennoù ar c'holon; kuñv e vez peurliesañ an dedro, nemet e tenn usvorc'h ar sug kreuz (*kreuzad naouezennus*, Gl. *gastropathie exsudative*) da zec'han gouliñvoù dre un adaverezh proteinoù ha da gas, gwechoù 'zo, ar gouziviad betek par ar fallezh.

polyalgies ◇ **polyalgia** ◇ **liesost** b. Laurioù e lies lec'h; *l. an oad eizik* (Gl. *p. climatérique*), arzostoù ha lezarzostoù o tarvezout alies gant ar merc'hed en oad ar paouez mizioù.

polyalgie idiopathique diffus : syndrome ~ ◇ **idiopathic diffuse polyalgia syndrome** ◇ **azoniad liesostel hennadek strewek** Teskad laurioù hollek a stader gant ar merc'hed e barr an oad, hir ha kuñv o dedro, kevret gant bezañs poentoù laurus ouzh ar pouezañ.

NOTENN : Betek 1986 e raed Gl. *polyenthésiopathie et fibrosite* (*liesenlenfo gant fibrozit*) eus an azoniad-mañ (sl. *enthésite*).

polyallélie ◇ **polyallelia** ◇ **polialleliezh** b. Lies furm kemeret hervez an hiniennoù gant ur c'henenn dargenat, houmañ o vezañ allel d'an hevelep genenn reol e pep hinienn; eno e ve an displegadur eus skalfad an derezioù grevusted a stader gant kleñvedoù ha nammoù hêrezhel 'zo.

polyangéite ◇ **polyangiitis** ◇ **liesgwazhiedennfo** g. Anaez naouus dre anonoù tanijenn a-strew war ar gwazhied.

polyangionévrite ◇ **polyangioneuritis** ◇ **liesgwazhiednervennfo** g. Anvad arveret da vodañ anaezioù diseurt, dianav o natur, naouus dre dizhadoù strewek ar gwazhied : purpura (sl. *purpura*), talmerennfo an divesker, ar galon, bloueigad (sl. *glomérulopathie*), azoniad Libman-Sacks (sl. *Libman-Sacks : syndrome de ~*), trodalmerennfo ulmennek (sl. *périar-térite nouvelle*), talmerennfo ividig (sl. *artérite temporale*), ganto un dedro gwresterel ha fâllezhus; da ouzhpennañ : al liesnervennfo santout-loc'hañ (Gl. *polynévrite sensitivomotrice*), azonet gant laurioù, direizhoù teñvel, andrafted, hag al *l. hennadek gwresterel anozvennel* (Gl. *p. essentielle fébrile anodulaire*), diforc'h ent wiadurel diouzh ar re usveneg.

polyartériel ◇ **polyarterial** ◇ **liestalmerennel** aa. A-zave da lies rann eus ar reizhiad talmerel.

polyartérite ◇ **polyarteritis** ◇ **liestalmerennfo** g. Tanijenn o tizhout war un dro lies rann eus ar reizhiad talmerel, da skouer ar c'hurunerennoù ha talmerennoù an izili traoñ.

polyarthrite ◇ **polyarthrit** ◇ **liesarzfo** g. Tanijenn lemm pe henek e lies kenvell war un dro.

polyarthrite aiguë épidémique tropicale ◇ **Bougainville rheumatism** ◇ **liesarzfo lemm darreuziat trovanel, remm g. Bougainville** Azoniad a orin dianav hag o parañ ent emdarzh, a stader en Okeania, ouzh e ober ul liesarzfo lemm terzhiennek, c'hwarrennoù hag un dispuilhad maelennkrugennek.

polyarthrite aiguë œdémateuse du sujet âgé ◇ **SzAm remitting seronegative symetric synovitis with pitting edemas, RS3PE** ◇ **liesarzfo lemm gouliñvel an henaded, irgennfo** g. **kemparzhhek gwadveiznac'hek didorrennek gant gouliñvoù pukadus, RS3PE** Azoniad dibaot andispleget, o kevredañ ul liesirgennfo kemparzhhek, gouliñvoù, ezvezañs ar barenn rumatoidel (sl. *facteur rhumatoïde*), o tarvezout trumm gant an henaded hag o parañ ent emdarzh; alies e stader bezañs an antigen HLA B 27.

polyarthrite chronique de l'enfant, polyarthrite chronique juvénile ◇ **Still disease** ◇ **liesarzfo henek ar vugale pe ar yaouern** Anaez paotoc'h gant ar merc'hed, o teraouiñ e-tro an oad a 4 bloaz, naouus dre goeñv ha laur kemparzhkek kenvelloù an daouarn, an daoulin hag an treid, uheladur bras tizh gouelediñ an hemati, elwenn neutrofil; alies, da geñver ar resmiadoù, e c'hrevusa an anafoù, o lezel nammoù war o lerc'h (tromaotoù, direizhoù ar c'hreskiñ), rouestlodoù lagadel (koraelenvezfo, kornaesafo, ferennlug); er furmoù rustañ (furmoù reizhiadel — d'ar re-mañ ez amberz an aozerion c'hallek an anvad *maladie de Still*), e kaver kevredet uswrester, yazadoù, gwazhadoù amgalonenn, krezenn, ampelenn, felc'husvent ha gwarrennoù; andispleg e chom arbenn ar c'hleñved, ha prouenn ebet n'eo deuet da harpañ ar goulakadurioù poreel pe hangaeel.

polyarthrite rhumatoïde ◇ **rheumatoid arthritis** ◇ **liesarzfo rumatoidel** Kleñved henek o tizhout ar merc'hed d'an oad eizik dreist holl, naouus dre un irgennfo daoudu kemparzhkek e kenvelloù pellek an izili, laurus ha kiriek da zistruj ar migern, an eskern hag ar stagelloù, da zistummadurioù ha da gammlakadurioù garv pe garvoc'h, gant terzhienn, daralladur ar stad hollek ha dedro betek an andrafted klok; grevasaet e vez gant ar glebor hag ar yonion, alese ar vuiegezh anezhañ e Breizh-Veur hag e Lec'henn; dianav e chom e arbenn; hiziv e tenner d'ober anezhañ un anaez unanhangaeel pe ur c'hleñved a'n hangaegemplezhioù (sl. *auto-immunité, complexe immunité*); keal a reer ivez eus ur *goudrevn hilel* (Gl. *terrain génétique*) kevaraez (dre an antigenoù HLA DR4 ha DR1); da brederiadur ez eus bet arnodet lies rumm liaoù, dezho gweredoù azoniek ha miwredoù : an haliou aour (abaoc 1935, sl. *chrysothérapie*), ar c'haenhormonoù (adal ar bloavezhioù 1950, sl. *corticothérapie*), an enepaludeier, ar metotrekسات ha hangaealsterioù all.

polyarthropathie ◇ **polyarthropathy** ◇ **liesarzad** g. Anaez naouus dre anafoù war lies kenvell.

polyarthrose ◇ **polyarthrosis** ◇ **liesartroz** g. Seurtad remm henek dic'henezhadel o teraouiñ a-vanguñv e-tro ar pergontvet bloaz, oc'h emastenn ent argammedek a-hed dekvloaziadoù da lies kenvell, hep darallad dourennel a rizh foel, er ervez da zec'han nammoù andrafus en divlezh hag en daoulin.

polychimiothérapie ◇ **polychemotherapy** ◇ **lieskimigurañ** Diounit diaser pe diaheul, a zoenadoù bihan, lies lia dezho an hevelep perzhioù yac'hadel, war-benn leiaat ar riskl pistriadel en ur virout ar gwerc'h kuradel, tun arveret e prederiadur ar poreoù hag ar c'hankroù.

polychondrite atrophiant chronique ◇ **chronic atrophic polychondritis** ◇ **liesmigornfo** g. **isteñvus henek** Kleñved dibaot, kevret gantañ anafoù lagad (amlersaefo, sl. *épisclérite*, koraelenvezfo, sl. *iridocyclite*, kevresaefo, sl. *conjonctivite*) ha

steuziadur dic'henezhadel klok pe klokoc'h ar migern, hemañ o tizhout ar fri (fri trouskin (sl. *nez en lorgnette*), an divskouarn, ar c'henvelloù (liesarzfo laurus ha disneuzius) ha, dreist holl, ar forzhioù analañ : boukaet emañ kebradur migornel ar vrian hag ar vronkez ha, dre se, diaezet grevus ar gwenterezh ; dre resmiadoù e tedro ar c'hleñved, en ur rouestlañ alies gant tizhadur ar stad hollek hag ar galon ; dianav eo e arbenn ; troet emañ an imboure'herion etrezek goulakadennoù un orin enzimatek, unhangaeel pe hangaeemplezhel.

polychromasie, polychromatophilie ◇ **polychromasia** ◇ **liesneadezh** b. Bezañs hemati a liv arc'hlas, alies un tammig brasoc'h eget ar re all ; anadenn vonan gant an nevezc'hanidi ; stadet e vez a du 'rall en amwadoù adc'henezhadel ha ruzvibarel (sl. *dysérythropoïèse*), en eskermvelfibroze (sl. *myélobrose*) hag er c'harkinomoù dassezadec.

polycnétique : réflexe ~ ◇ ◇ **damoug** g. **liesfiñvadec** Damoug a-stirenn naouus dre an erwezhañ e rezh un arread argrezadoù.

polyclinique ◇ **polyclinic** ◇ **poliklinikenn** b., **lieskurdi** g. -où Diazevadur ma embreg mezeion hag eilerion vezegeal a lies diskiblezh.

NOTENN : Ned eo ket unvan despizadurioù p. evit a sell an herberc'hiañ : gwech e kaver meneget : “evit gouziviaded diavaez”, gwech : “ma klañvdier gouziviaded” (sl. *policlinique*).

polyclonal ◇ **polyclonal** ◇ **liesklonel** aa. A-zave da lies klon (sl. *clone*).

polyclonie ◇ **polyclonia** ◇ **lieskrid** g. Kenheuliad argrezadoù krider (sl. *clonie, épilepsie généralisée, myoclonie*).

polycorie ¹ ◇ **polycoria** ◇ **uskadaviñ, uskadav** g., **polikoriezh** b. Daspugnad danvezennoù kadavet (glikogen, lipid) e-barzh kelligoù hael an avu, al lounezh, ar c'haher pe an nerveg, o tec'han usteñv an organoù, agevenep d'an dispilidoz ma vez hogennet an druzoni ebarzh ar reizhiad retikuloendotelel.

polycorie ² ◇ **polycoria** ◇ **liesmab** g. Ezreolder ganedigal pe arzeuat an envez, anezhañ bezañs daou pe lies igorenn vabel.

polycorique ◇ **polycoric** ◇ **1 uskadavek** aa., **polikorek** aa. **2 uskadavel** aa., **polikorek** aa. 1 O c'houzañv gant an uskadaviñ, sk. *avu u. pe p.* 2 A-zave d'an uskadaviñ (sl. *hépatomégamie polycorique*).

polycrotisme ◇ **polycrotism** ◇ **lieslamm** g., **polikrotegezh** b. Steudad bosoù war linenn diskenn ar poulzwezed pe ar gwaskwezed talmerel (sl. *dicrote : onde* ~).

polydactylie, polydactylisme ◇ **polydactyly** ◇ **usniver** g. **bizied, bizusniver** b. Ezreolder hêrezhel treuzkaset er mod trec'hek, anezhañ bezañs bizied dreistniver.

polydipsie ◇ **polydipsia** ◇ **goursec'hed** g. Sec'hed reñverek, da ziforc'hiñ diouzh ar *mezvar* (sl. *dipsomanie*, La-07 90) ha diouzh an *diedvar* (sl. *potomanie*, La-07 90), bredazoniadoù ; stadet e vez ar g. e-touez azonoù an *diabet heuz* (sl. *diabète insipide*).

polydysplasie ◇ **polydysplasia** ◇ **liesmiwe** g. Bezañs en un hinienn eus lies kammneuziad diwar direizhoù diorren ar gwiadou pe an organoù.

polydysplasie ectodermique héréditaire ◇ **congenital ectodermal defects** ◇ **liesmiwe ektodermel hêrezhel** Stroll anaizioù familhel boutin etrezo strafuilhoù e diorren an organoù a orin ektodermel ; ar re anavezetañ eo ar *c'hwezanvorc'h gant gouvlevezegh hag andent* (Gl. *anhidrose avec hypotrichose et anodontie*) (sl. *anhidrose, ano-dontie, hypotrichose, Schäfer : syndrome de* ~).

polydyspondylie ◇ **polydyspondylism** ◇ **liesmellennvibar** g. Stroll kammneuziadoù ar mellkein, skorted savder-pouez, dilerc'h bred, e dalc'h ur gouskoevad kromozomel, anezhañ bezañs 45 kromozom e-lec'h 46 da heul un treuzloañ etre aotozomou ar reoù 13 ha 22.

polydystrophie ◇ **multiple dystrophia** ◇ **liesmideñv** g. Strafuil an teñvañ o tizhout lies organ, sk. : *I. Hurler* (sl. *Hurler : maladie pe syndrome de* ~).

polyembryonie ◇ **polyembryony** ◇ **liesrizhellbarañ** Furmiñ div pe lies hinienn adal ur vi a zeu e gelligoù da amparañ rizhennoù diforc'h a zeu da vezañ kement all a c'heveller unviel (sl. *monozygote*).

polyendocrinopathie auto-immune ◇ **autoimmune polyglandular syndrome, autoimmune polyendocrinopathy, auto-immune polyendocrine syndrome** ◇ **liesenborc'hanaez unhangaeel, azoniad liesenborc'hadel unhangaeel** Kevreted un niver kleñvedoù unhangaeel kiriek da skorted lies gwagrenn enborc'hañ ; o rannañ a reer etre ur *rizh I* (sl. *Witaker : syndrome de* ~), *rizhoù II* ha *III* (sl. *Schmitt : syndrome de* ~ 2) ; e se, a-zasken emañ strollet arskoedisvorc'h, diabet a rizh I, skoedus- pe -isvorc'h, skorted kaenuslounezhel ha gonadel, kleñved Hashimoto, hag ivez amwad Biermer, darc'hoal henek ha diwaoutad.

polyganglionévrite ◇ **polyganglioneuritis** ◇ **lieskangrennfo** g. Azoniad naouus, *ent klinikel*, dre gammeraezioù ha gouzezioù oc'h anadiñ e pep live eus ar c'horf, hag un dedreiñ marvel etre 4 ha 45 deiz dre seizi an analañ pe an ezwal kalon ; *ent neuziadurel*, dre anafoù kenkizus ha distrujus an holl gangrennoù ha dre anafoù dic'henezhadel an nervennoù trobarzh ; dianav eo e arbenn.

polygénique ◇ **polygenic** ◇ **liesgenennel** aa., **liesgen-** A-zave da lies genenn, pe a-geñver gant lies genenn, sk. *hêrezh liesgenennel* pe *liesgenhêrezh* (Gl. *hérédité polygénique*) (sl. *monométrie, polymétrie*).

polyglobulie ◇ **polyglobulia** ◇ **elruz** *g.* Despizañ a reer an *e.* evel *ruzusvec'h*, eleze evel reñver tolz hollet an hemati er bevedeg; er pleustr, e tremener gant dewerzhañ ar *ruzriñv*, eleze niver an hemati dre mm³ gwad, hag ober enta kensterioù eus *elruz* ha *ruzusriñv* (eus Gl. *polyglobulie* ha *polycythémie*); kel a reer a *e.* pa sav ar ruzriñv dreist 6 milion dre mm³ ha pa sav ar ruzvec'h war un dro (sl. *hématocrite*, *érythémie*, La-18 274-276).

polygonosomie ◇ **polygonosomia** ◇ **gonozomusiñv** *g.* Gouskoevad kromozomel naouus dre vezañs ouzhpenn daou gromozom revel (pe gonozom) e-barzh kelligoù ar soma (sl. *polyomie*).

polykérateose congénitale ◇ **polykeratosis congenita** ◇ **polikeratoz** *g.* **ganedigel** Termen genadel kinniget gant Touraine evit arouezñ kroc'henoù ganedigel a zo boutin etrezo un hiperkeratoz reizhiadek : keratoz palv-sol, troc'hivin, keratoziou bolc'hennek ha nes-kenvell, leukokeratoz ganedigel ar glaugrennoù, iktioz gloevennek, hiperdermoliz gloevennek.

polykystique : **maladie** ~ ◇ **polycystic disease** ◇ **kleñvel lieskistel** Anaez naouus dre ar vezañs eus kistoù ganedigel niverus bras pe vrasoc'h ebarzh al lounezh, an avu, ar skevent pe an ilgreiz pe lies organ war un dro.

polymère ◇ **polymer** ◇ **daskediad** *g.*, **polimer** *g.* -où Molekul o tisoc'h eus an daskediañ (sl. *polymérisation*), sk. : an *drenken dezoksiribonukleek*; anv a reer a *homodimer*, *homotramer*, h.a., pa vez unrezh ar molekul daskediet, a *heterodimer*, *heterotramer*, h.a., pa vezont liesrezh.

polymérie, hérédité polymérique ou **polyfactorielle** ou **polygénique** ◇ **polymer** ◇ **liesgenhêrezh b.**, **hêrelezh liespar-enn** Seurtad hêrelezh hevelep m'emañ pep hini eus an doareennoù reol pe ezreol a-zalc'h ouzh lies genenn (sl. *hérédité, dimérie, monomérie, polygénique*).

polymérisation ◇ **polymerization** ◇ **daskediañ, daskediadur** *g.* Dazgwered oc'h ober dinodiñ ereoù kimiek etre molekul a dolz mol izel (ar *monomer*) ha dre se amparañ molekul a dolz mol uhel pe *keurvolekul* (ar *polimer*), sk. : an ampez, ar c'haoutchoug, ar mezell (sl. *macromolécule*).

polymorphe ◇ **polymorphic** ◇ **liesstumm** aa., **liesneuz** aa., **liesrezh** aa. A-zivout un anadenn, ur stad, un anaez o wiskañ arvezioù daskenek (sl. *acné juvénile polymorphe, érythème polymorphe, polymère*).

polymosite ◇ **polymyositis** ◇ **lieskahrfo** *g.* Termen genadel oc'h arouezñ un niver kleñvedoù foel anporeel hag anlinus, dianav o arbenn, o tizhout ar c'higennoù rizennek atelel, naouus dre un isteñv laurus, dic'henezhadur ar c'hahergelligoù, annonoù gwadliñv ha skleroz, kevret gant terzhienn, gwazhad ar stad hollek hag alies daralladoù ar c'hroc'henn (sl. *dermatomyosite*), an nervennoù trobarzh, ar gwad hag ar gwazhied; e kevarguz emañ an orin anezho, aozerion 'zo oc'h ober anezho kleñvedoù ar c'hollagen (sl. *collagène : maladie du* ~), re all kleñvedoù dre zreistkizidigezh daleet (sl. *hypersensibilité 2*); e-kichen al *l. lemm* e noter *l. henek* gaouviopatek, gaouviastenek, arzanaezel; hervez aozerion all e ve an azoniad nervgouliñvel ur seurtad eus al *l. gouliñvel* (sl. *neuro-œdéma-teux : syndrome* ~).

polymyxine ◇ **polymyxin** ◇ **polimiksin** *g.* Stroll bevastalerioù eus kerentiad ar polypeptidoù (sl. *polypeptides*) goubaret diouzh *Bacillus polymyxa*; bakterilazh, met pistriek ouzh al lounezh hag an niverg eo ar *p. B*; pistriek ivez eo ar *p. E* (anvet ivez *kolistin*, Gl. *colistine*) goubaret diouzh *Bacillus colistinus*.

polynésie ◇ **polinezia** *g.* Muiadur an niver hag an ec'honad eus evezigoù Langerhans, o tec'h an usvroc'h insulin hag ur gwadivsec'h glukoz, e raklen gorrekadur ar c'hennevid; erzerc'hañ a ra ent klinikel dre un treutadur bras, un iswask talmerel hag ur fallezh argreskus betek un diwezh feudek.

polyneuromyosite ◇ **polyneuromyositis** ◇ **liesnervennkahrfo** *g.* Liesnervennfo kevret gant anafoù kaher (kahrfo) dizalc'h diouzh an argerzh nervennfoel; *l. sulfamid* (Gl. *p. sulfamidique*), *l. e* dianlen un diounit hirbad ha paoterek sulfamidoù.

polyneuropathie ◇ **polyneuropathy** ◇ **liesnervennaoued** *g.*, **liesnervad** *g.* Anaez o wazhañ lies tiriad nerval (sl. *neuropathie*).

polyneuropathie périphérique ◇ **peripheral polyneuropathy** ◇ **liesnervennaoued pe liesnervad trobarzh** Nep anaez o wazhañ diaser pe diaheul lies nervenn drobarzh; *1)* pa vez ankempazhek an tizhadoù, e reer anv a *unnervennaoued liesel* (Gl. *mono-neuropathie multiple*) ha, pa vez tanijennek an anafoù, a *unnervennfo liesel* (sl. *multinévrite*); *2)* pa vez kempazhek an tizhadoù, e tiforc'her etouez al liesnervadoù trobarzh al *liesgwiziennfo* (sl. *polyradiculonévrite*), naouus dre an divielinaat (sl. *démýélinisation*) ha, pa vez darallet an aksonoù, al *liesnervennfo* (sl. *neuropathie périphérique, polynévrite*).

NOTENN : Kemplezh ha distabil eo an termenoù gallek ha saoznek arveret da arouezñ anaezioù an nervennoù, si hennezh o tennañ da gemplezhded an dachenn imbours'het ha da genvezañs lies talbenn a 'n imbours'h. Notañ a reer amsteriegezh termenoù 'zo, evel an daouad Gl. *neuropathie* ha *névrite*, Sz. *neuropathy* ha *neuritis*, arveret gwech evel unster, gwech evel allster. Strivet m'us da gompezañ hevelep skoilhaù termenadurel, hep dont a-benn bep taol.

polynévrite ◇ **polyneuritis** ◇ **liesnervennfo** *g.* Teskad anafoù daoudu ha kempazhek war akson lies nervenn drobarzh, dezho arbennoù liesseurt : pistriel (alkool), liael (kimigurañ), kennevidel (diabet), poreel, hêrezhel a-wechoù er furmoù henek, dezho erzerc'hadoù santadel (leiadur an eraezñ, kammeraezioù muiiek en eizhaennoù an izili : kemenerion, pikadurezh, loskadurezh) ha loc'hadel, skañv daoust da isteñv ar c'higennoù, ha dre un dedro hirbad; lakaet ermaez diounezadur ar vitamin B₁ emañ peurliesañ ar prederiadur a-geñver gant natur an arbennoù; hiziv e tenner da erlec'hiañ ouzh *liesnervennfo* an anvad *liesnervennaoued kempazhek pellek* (Gl. *polyneuropathie symétrique distale*).

polynucléaire ◇ **polynuclear 2 granulocyte** ◇ **1 lieskraoñell** aa., **lieskraoñellek** aa. **2 granulokitenn** b. (s. : **granulokit**) *1* A-zivout un elfenn a zo enni lies kraoñell (sl. *noyau*). *2* sl. *granulocytes*.

NOTENN : Gant aozerion 'zo e klever bepred Gl. *polynuclé-* (*lieskraoñell-*) ha deveradoù pa vez anv eus ar *granulokit*.

polynucléose ◇ **granulocytosis**, **polynucleosis** ◇ **granulokitusriñv** g. Reñver feur ar granulokit amredat, dreist 7 000 dre mm³.

polynucléotidase ◇ **polynucleotidase** ◇ **polinukleotidaz** g. Enzim borc'het gant glaourgenn ar pervez en araez da ec'haozañ an trenkennoù nukleek e nukleotidoù (sl. *nuclease*).

polyome ◇ **polyoma** ◇ **poliom** g. Seurtad kankr devoudet gant ur viruz (*papovirus*) a stader gant spesadoù loened 'zo (logod).

polyopie ou **polyopsie** ◇ **polyopia** ◇ **kammwel** g. **liesek**, **liesgwel** g. Gwelout a-gevret lies skeudenn a 'n un ergorenn; l. *unlagadel* (Gl. *p. mono-culaire*), merzhout lies skeudenn (peurliesañ teir) gant ul lagad, strafuilh ageñver gant kemmoù gou-skogusted etre lies parzh eus ar ferenn.

polyoside ◇ **polyoside** ◇ **poliozid** g. Sukrenn a dolz mol uhel, o tisoc'h he molekulenn eus uniadur un niver bras molekul oziou, sk. an *ampe*z, ar *glicogen* (sl. *ose*, *oside*).

polype ◇ **polyp** ◇ **polip** g. Yoc'henn, kuñv peurliesañ, evodet diwar ur goload epitelem kranennek pe kranenniñsek, ensteudet dre un droadenn gwech ledan ha ber, gwech moan ha hir, e speur ur gavenn naturel, stadet war an darn vuiañ eus ar glaourgennoù (kolon, krozh, gouin, h.a.) hag e-barzh ode diavaez ar c'hleved (sl. *nasopharyngien* : *polype* ~).

polypectomie ◇ **polypectomy** ◇ **polipezvenañ** Dazbidañ ur polip.

polypeptidase ◇ **polypeptidase** ◇ **polipeptidaz** g. Enzim en araez da zourannañ ar polipeptidoù etre peptidoù.

polypeptide ◇ **polypeptide** ◇ **polipeptid** g. -où Uniad lies peptid o chom e dolz mol dindan 10 000 d, andializadus, o tisoc'h eus ec'haozadur an albumineier er bevedeg; bezant e vez ar polipeptidoù ebarzh gwad ha troazh an hiniannoù reol (sl. *peptide*).

polypeptides ◇ **polypeptide antibiotics** ◇ **bevastalerioù** l. (g.) **polipeptidek**, **polipeptideier** l. (u. : **polipeptideg** g.) Stroll bevastalerioù a c'hoarvez o molekul a zigorvelloù ouzhpenn 50 amindrenkenn uniet dre ereoù peptidek; pistriek int ha nebeut arveret.

polyphagie ◇ **polyphagia** ◇ **gournaon** g. Reñver an ezhomm debriñ hag ezvezañs santad ar gwalc'h (sl. *boulimie*, *phagomanie*).

polyphénol ◇ **polyphenol** ◇ **polifenol** g. Anvad genadel ar c'hediadoù aromatek a zo enno lies soaz fenol; kediedik kenan, e vezont arveret da ren kevanaozioù; niverus int er riezad plantel : en tanninoù hag e kalz livuzennoù, evel an antrakinoù (Gl. *anthraquinones*) (ruz), ar flavonoù (Gl. *flavonoïdes*) (melen), an antokinoù (Gl. *antho-cyanes*) (du ha glas); emsavus d'ar yec'hed kalongwazhiedel e ve ar c'hevredad tannin-antokian, bezant er gwinoù ruz (sl. *phénol*).

polyplôidie ◇ **polyploidy** ◇ **poliploidiezh** b. Stad ur gellig piaouer da ouzhpenn 2 n kromozom; hervez ar muiaer e reer anv eus *triploidiezh*, *tetraploidiezh* (sl. *aneuploïdie*, *hétéroplôide*).

polypnée ◇ **polypnoea** ◇ **elanal** g. Ustalm an analañ e dianlen ispad an analgor, anadenn a stader e furmoù 'zo a vic'hwez (sl. *détresse respiratoire du nouveau-né*, *dyspnée*).

polypointes ◇ **liespikouù**, **fourrad** g. **pikouù** Heuliad herrek pikou war an empennvarrwezad da geñver ur c'hrid a 'n droukfell.

polypose ◇ **polyposis** ◇ **polipoz** g. Anaez naouus dre genvezañs polipoù niverus; *p. adenomatus familhel* pe *poliadenom ar vouzellenn vras* pe *p. kolonyouk 'hel strewek* (Gl. *p. adéno-mateuse familiale* pe *polyadénome du gros intestin* pe *p. rectocolique diffuse*), kleñved hêrezhel dibaot treuzkaset er mod aotozomek trec'hek naouus dre an evodiñ d'ar gaezouregezh eus polipoù diouzh glaourgenn ar c'holon, erzerc'h dre strafuilhoù pervezel (laur, darc'hoal, gwadliñvoù) hag en ervez da gankraat; *p. ar fri* pe *kleñved Woakes*, frifo hollel, linek, gant askomfo ar sileg, paotidigezh polipoù glaourgennel tev niverus.

polyradiculonévrite ◇ **polyradiculoneuritis** ◇ **liesgwrienniñ** g. Nervennoù etrebardh o c'hoarvezout, *ent klinikel*, eus un tizhad daoudu kemparzhek hag, *ent wiadurel*, eus un divielineat; e-keñver an *dedreñ* e tiforc'her furmoù lemm, goulemm ha henek; 1) *ur furm lemm* (pe *azoniad Landry-Guillain-Barré* pe *plezhadfo lemm*, Gl. *plexite aiguë*), azoniad naouus, *ent neuziadurel*, dre danijenn ha divielineadur gwrienniñ nerverl niverus, gant digevredin albumin-kelligoù al liñvenn benn-kein; *ent klinikel*, dre gammeraezioù laurus, andrafta ha steuz an damougoù a-stirenn e lodenn draoñ ar c'horf dreist holl, en ervez avat da emastenn da wriziennoù an holl nervernoù a-livenn hag a-glopenn; dre un ankalez analadel pa vez gwazhet nervernoù an analañ ha rekizet neuze an analeilerezh; ur wech aet hebiou prantad al lemmdez argiz ingal an holl azonoù etrezek ar pare; dibaot e vez an arlenadoù (seizioù); ned eo ket peursklaeraet evit c'hoazh arbennelezh al l. : er pep muiañ eus an degouezhioù e hañval bezañ kentael ha disoc'h eus dizurzhioù hangaeel; gwechoù 'zo e tarvez da heul ur pore pe un anaez dre viruz, ur c'hleñved Hodgkin pe ur vaksinadenn; 2) *furmoù goulemm* a zeskriver, hennadek pe pistriel; 3) evel *furmoù henek* e renker al l. *arzuat* (gammanaouedoù monoklonel, haza) hag al l. *hêrezhel* (kleñved Charcot-Marie-Tooth) (sl. *Charcot-Marie* : *maladie de ~*, *démýélinisation*, *détresse respiratoire de l'adulte*, *dissociation albuminocytologique du liquide céphalorachidien*, *neuropathie*, *paresthésie*, *plexite*, *sida*).

polysérite ◇ **polyseritis** ◇ **lieslevrgennf** g. Tanienn lies levrgenn en ur ser.

polysomie ◇ **polysomy** ◇ **polizomiezh** b. Gouskoedav naouus dre vezañs ouzhpenn daou gromozom e-lec'h ur re.

polysomnographie ◇ **polysomnography** ◇ **lieshundresenañ** Bodad an imbour'hioù war ar c'housked : empenn- ha kalon-varrwezañ, kahervarrwezañ analadel, gwentwezañ (aergas fri-geoù), oksigenventañ treuzkroc'hene, renet e ser prederiañ anaazioù 'zo evel an harzanaloù kousked (sl. *apnée* : *syndrome des ~s du sommeil*, *épreuves fonctionnelles respiratoires*, *hypnogramme*, *oxymétrie*).

polyspermie ◇ **polyspermy** ◇ **sperelenteiñ**, **sperelentoad** g. Bezañs ouzhpenn ur pronukleüz gourevel er vi frouezhiget da heul enteñ ezreol div pe lies spergellig.

polysplénie ◇ **polysplenia** ◇ **brienfelc'h** b. Kammneuziad dibaot a 'r felc'h, a zo darnaouet e rezh tolzennoù bihan astrew e-barzh kavenn ar c'hof, kevret hogos bepred gant kammneuziadoù er flugez all, kalon, skevent, avu, kanol vezhur.

polythélie ◇ **polythelia** ◇ **eldezh** g. Kammneuziad, anezhi bezañs ouzhpenn un daou veg bronn.

polytransfusé ◇ **arreskuilhadour** g. **-ion** Gouziviad bet diounezet dezhañ lies treuzskuilhadur.

polytraumatisé ◇ **liesdaraezed** g. **-idi** Gouziviad lies gloazad diaser.

polytraumatisme ◇ **polytraumatism** ◇ **liesdaraez** g. **-ioù** Teskad lies gloazad diaser.

polyurie ◇ **polyuria** ◇ **ustroazh** g., **eldroazh** g. Reñver ar borc'hañ troazh.

NOTENN : Diezhomm n'eo ket dec'heriañ derezioù kementadel ar borc'hañ troazh ; alese e kinnigan, evit an dioueroù : *istroazh*, *oltroazh* (sl. *oligurie*), *damanthroazh* (sl. *oligoanurie*), *antroazh* (sl. *anurie*) ; evit ar reñverioù, er ster ledan : *ustroazh*, evit ar reñverioù muiek : *eldroazh*.

polyvalent ◇ **polyvalent** ◇ **liesgwerc'h** aa., **liesgwerc'hek** aa. A-zivout ur vaksin prientet diwar-bouez lies spesad garvevion ha, dre se, efedus ouzh daskenad ar c'hleñvedoù devoudet gant an holl hadennoù-se.

polyviscéral ◇ **polyvisceral** ◇ **liesflugezel** aa. A-geñver gant lies organ


Pomeroy : **opération de ~** ◇ **Pomeroy's operation** ◇ **oberatadenn** b. **Pomeroy** Gaonac'hadur ar vaouez dre gilweañ korzenn ar grozh war-hed un nebeut kentimetroù diouzh korn ar grozh, argoulmañ ar c'hilbleg furmet evel-se hag erziwezh e zazbidañ.

pommade ◇ **pommade** ◇ **ogan** g. **-où** Angevezh apotikel toazek, evit an arver diavaez, oberiet dre veskañ liaoù dileizhet pe arluget hag un ambrougenn druz a orin meinel (vazelin) pe bevel (lanolin). Kemm a vez lakaet etre an *ogan* hag an *traet* tevoc'h, nemet o liñvennañ ouzh gwrez ar c'hroc'hen.

pompe ◇ **pump** ◇ **pomp** g. **-où** Ardivink amkanet da zouhenniñ pe da ensinklañ liñvennoù pe aezhennoù.

pompe à insuline ◇ **pump** ◇ **pomp** g. **insulin** Ardivink ensteudadus amkanet da zasparzhañ ent reoliek kementadoù insulin diouzh ezhommoù ar bevedeg.

pompe à protons ◇ **proton pump** ◇ **porzher** g. **-ioù proton** Ar porzher proton zo ur protein treuzkoc'hennel, ha resisoc'h un dezouger koc'hennel oberiat, a zilec'h ar proton enep an diri bec'h anezho diwar-bouez ar gremm dilaosket dre zourannadur ar molekul adenosin trifosfat, hervez an dazgwered :



pompe à sodium ou **à sodium-potassium** ◇ **sodium pump** ◇ **porzher** g. **natriom** pe **porzher natriom-kaliom** Gwikefre gelligel o kevarezañ dezougerezh an ion Na^+ a-dreuz ar goc'henn en eskemm eus ion K^+ o vont e-barzh ar gellig.

pompe implantable ◇ **implantable drug pump** ◇ **porzher** g. **liaoù ensteudadus** Pomp amkanet da zasparzh liaoù 'zo ent dangroc'hennel, ent engwazhiedel, h.a., a c'haller gouleviñ ar c'has anezhañ ; arveret er gankrouiezh dreist holl.

pompholyx ◇ **pompholyx** ◇ **pomfoliks** g. Anv roet d'ar pemfiguz henek (sl. *dyshidrose*, *dysidrose*, *pemphigus*).

Poncet : **maladie de ~** ◇ **Poncet's disease** ◇ **kleñved** g. **Poncet** Remm torzhellek (sl. *rhumatisme de Poncet*).

Poncet : **opération de ~** ◇ **Poncet's operation** ◇ **oberatadenn** b. **Poncet** Ezforzhañ kan troazh a-c'harbedenn, kant-roazhezforzhañ a-c'harbedenn (sl. *urétrostomie périnéale*).

ponction ◇ **puncture** ◇ **ezwanañ** Gwezhiadenn a c'hoarvez a sankañ ur broskan, un nadoz pe beg un erc'hel en ur gavenn naturel pe gleñvedel, evit erlemel un darn eus an endalc'had anezhi e sell d'an deznaou (ezwanadur erc'hwiliañ) pe e sell d'ar mezegeañ (ezwanadur karzhañ), pe c'hoazh evit ensinklañ un danvezenn (lia, aozad dargemm).

ponction amniotique, **amniocentèse** ◇ **amniocentesis** ◇ **ezwanañ an amnion**, **amnionezswanañ** (sl. *amniocentèse*).

ponction-biopsie ◇ **needle-biopsy** ◇ **bevsav** g. & v. dre ezwanañ Ebarzhiñ ur broskan pe un nadoz arbennik a gavnez bras, a-dreuz d'ar c'hroc'hen, en un organ leun, askorn, avu, lounezh, war-benn erlemel dre suc'hañ un darn parenkim, e sell d'un imbourc'h gwiaodniel.

ponctions étagées ◇ **multilevel punctures** ◇ **ezwanañ lieslive** Ezwanañ embreget e lies live eus al livenn gein war-benn studiañ kenaoz al liñvenn benn-kein a-us pe a-is d'un amwask pe d'ur c'hombodadur.

ponction exploratrice ◇ **exploratory puncture** ◇ **ezwanañ erc'hwil** Ezwanañ amkanet da wiriañ bezañs ha natur ul liñvenn en ur gavenn.

ponction lombaire ◇ **lumbar puncture** ◇ **ezwanañ a-loan** Ezwanadur embreget diwar-bouez ur broskan er gavenn endan-gevnidek, ar peurliesañ etre ar bevare hag ar bempvet mellenn a'n dargreiz, war-benn erlemel al liñvenn benn-kein e sell d'an deznaouiñ pe d'ar mezegeañ, evit ebarzhiñ un danvezenn liael pe un aozad dargemm (sl. *rachicentèse*).

- ponction orbitaire** ◇ **orbital puncture** ◇ **ezwanañ a-bod** Ebarzhadur un nadoz a-hed sel ar pod lagad, dre ar skarr krec'h, war-benn dastum al liñvenn benn-kein tro-empenn pe ensinklañ ul lia.
- ponction sous-occipitale** ◇ **cisternal puncture** ◇ **ezwanañ endan-gilpenn** Sankañ un nadoz etre an askorn kilpenn hag ar vellenn varc'h war-benn dastum al liñvenn benn-kein e sell d'an deznauñ pe d'ar mezegañ, evit ebarzhiñ un danvezenn liael pe un aozad dargemm da brientiñ un empennluniñ.
- ponction sternale** ◇ **sternal puncture** ◇ **ezwanañ klerenn, ezwanañ diouzh ar glerenn** Sankañ un nadoz e dornell ar glerenn, a-dreuz d'al lavnenn diavaez, betek ar mel eskern, a erlamer ur standilhon anezhañ war-benn studiañ ar melrestrad.
- ponction sus-pubienne** ◇ **suprapubic puncture** ◇ **ezwanañ us-kaezour** ezwanañ eus ar c'hwezhiell ergemennet e degouezhioù 'zo a azdalc'h lemm, dre sankañ an nadoz diouzhtu a-us d'an askorn kaezour.
- ponction ventriculaire** ◇ **ventricular puncture** ◇ **ezwanañ ar c'hambrou kostezel** Ebarzhadur un nadoz e kambrou kostezel an empenn embreget, evit ur bugel, a-dreuz d'ar feunteunig, ha dre drepanañ-ezwanañ, evit un oadour.
- pondéro-dynamométrique : rapport** ~ ◇ **weight to dynamometric average ratio** ◇ **keñver pouez/keitad nerzhventouriel** Gwerzhad gouzout dre rannañ pouez ar gouzrec'h dre ar c'heitat nerzhventouriel (jedet diwar ar gwerzhadoù roet gant gwask an dorn dehou, ar sachañ diazremm ha diazerc'h ar vrec'h) liesaet dre 10. ar werzhad reol zo 83,5.
- pondérostatural ou staturpondéral** ◇ **pondostatural** ◇ **pouez-savder aa. pe savder-pouez aa.** A-zave d'ar pouez ha d'ar savder, sk. *kresk savder-pouez*.
- pongitif** ◇ **stabbing, boring** ◇ **gwanus aa.** A-zivout ur rizh laur.
- ponos** ◇ **ponos** ◇ **ponoz g.** Anv roet d'ar c'hala-azar bugelel.
- pont** ◇ **1 bridge, 2 pons** ◇ **1 briv g. 2 pont g.** 1 Dentosod oc'h amsaviñ un pe lies dant, anlenet ouzh an dent en daou du d'ar boulc'h 2 Lodenn etreat kef an empenn, loet a-us d'an hirvel, dispartiet dioutañ gant an nant hirvel-pont, a-is d'an troadoù empenn, dispartiet diouto gant an nant pont-troadoù, ha dirak an ilpenn. Daou stirad an nervernn drigevell a eskor diouzh an talioù kostezel anezhañ. E dal a-dreñv zo parzh ar poull karavek.
- pontage** ◇ **by-pass** ◇ **pontañ** Oberatadenn amkanet da adsavelañ ar red en ardraoñ da anforzh bevennet un dalmerenn. Arverañ a reer un imboudenn dasforzhzet ouzh an dalmerenn en argrec'h hag en ardraoñ d'an anforzh, skoebet evel-se gant lanv ar gwad. Arveret e vez a-wechoù ur pontañ padennek war-benn amdreugañ red ar gwad diouzh ur gennad talmerel a embreger ur wezhiadenn surjaniel warnañ.
- Pontiac : fièvre de** ~ ◇ **Pontiac fever** ◇ **terzhienn b. Pontiac** Kleñved terzhiennek kuñv, o tevoudañ laurioù kaherel.
- pontin, pontique** ◇ **pontic, pontine** ◇ **pontel aa.** A-zave d'ar pont, sk. : *azoniad pontel*.
- pontocérébelleux** ◇ **pontocerebellar** ◇ **pont-ilpenn aa.** A-zave d'ar pont ha d'an ilpenn.
- pool** ◇ **pool** ◇ **kalzad g.** Er bevedeg, hollad padek an danvezennoù a un seurt, sk. : ar *c'halzad natriom*.
- Pool : phénomène de** ~ ◇ **Pool's phenomenon** ◇ **anadenn b. Pool** Argrezad kaherioù ar vrec'h devoudet gant un deheadañ a 'r plezhad ar vrec'h ouzh he sevel er vann. Arsellet e vez an arouez en detaniezh.
- poplité** ◇ **popliteal** ◇ **an arzell b.** A-zave da dal a-dreñv ar glin, sk. : *poull an arzell, kigenn an arzell*.
- Poppen** : **opération de** ~ ◇ **Poppen operation** ◇ **oberatadenn b. Poppen** Dazbidañ an nervernoù splanknek hag ar c'hef simpatek eus ar pevare kangrenn a 'r c'hein d'an eil pe d'an drede kangrenn a'n dargreiz lakaet e-barzh. Ar wezhiadenn-se a vez kaset da benn a bep tu, dre an hent e-maez krezoù, e-ser div abadenn kenheuilh, da barraat ouzh an uswask talmerel padek hennadek. He dilezel a reer tost da vat.
- Popper** : **épreuve de** ~ ◇ **Popper test** ◇ **prouad g. Popper** Gwodusvec'h reol al lipaz goude ensiklañ engwazhiennel eus sekretin blivaet gant an drenkenn β-metilkolek. Faziañ a ra e degouezh skorted ilgreiz. A-wechoù e vez graet ivez *prouad dre sekretin* anezhañ.
- Popper et de La Huerga** : **réaction de** ~ ◇ **Popper-de La Huerga reaction** ◇ **dazgwered g. Popper-de La Huerga** Malzenniñ ar gwadveiz pa azdoder ur gediuzenn diwar sulfat amoniom. An douested anezhañ a zitour bec'h ar gamma-globulinoù gwadveiz.
- poradénique** ◇ **poradenic** ◇ **poradenek aa.** A-zave da gleñved Nicolas-Favre en arbenn eus al lies annon o kleuziñ ar gwerblennoù tanijennek. Sk. : *c'harrenn boradenek*.
- poradénite** ◇ **poradenitis** ◇ **poradenitiz g.** Heñvelster gant *gleñved Nicolas-Favre*, al *limfogramulomatoz gwenerel*.
- Porak et Durante** : **maladie de** ~ ◇ **osteogenesis imperfecta** ◇ **gleñved g. Porak ha Durante, miwe g. amaskornenn** Korreded izelishedek diwar torroù er c'hostoù pe en izili, e-doug an enkrozhevzh pe e-doug mizvezhioù kentañ a'n hoali. Ec'honek eo ar penn, askornaet fall eo ar c'hlopenn ha berr kenan an izili. Miwe ganedigel hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, feudek buan kenan.
- Porcher** : **épreuve de** ~ ◇ **Porcher's test** ◇ **prouad g. Porcher** Skinimbouc'h ar c'hreuz war-lerc'h un ensinkladur morfing, war-benn kreskiñ tant, ampled ha buanez fiñvoù ar c'hreuz.
- porchers** : **maladie des jeunes** ~s ◇ **young swineherd's disease** ◇ **gleñved g. ar voc'herion yaouank** Leptospiroz ar voc'herion yaouank (sl. *leptospiroz*).

- pore** ◇ **pore** ◇ **savnig** g. -où Igoenn vihan kenan war c'horre ul lienenn, ur goc'henn, ur wiadenn o klotañ gant un entremez eus al luniadur issezet.
- pore sudoripare** ◇ **sweat pore** ◇ **savnig** g. **c'hwezpar** Pep hini eus igorennoù diavaez ar c'hanolioù degorzhañ a 'r gwagrennoù c'hwezpar.
- porencéphalie** ◇ **porencephaly** ◇ **empenngleuzennegezh** b. Kammneuziadur ganedigel naous dre vezañs kleuzennoù er bluskenn empenn diwar arsav diorredigezh ar bluskenn pe diwar un naoued ganedigel isteñvus; ent klinikel e naou dre an diodezh, barradoù droukfellvanek, an atetoz, h.a.
- poroux** ◇ **porous** ◇ **savnigouek** aa. Gant savnigoù.
- Porges : réaction de ~** ◇ **Porges' reaction** ◇ **dazgwered** g. **Porges** Diwanadur un dierc'had er gwadvez pa atoder un dileizhenn glikokolat natriom. Hervez Porges, ne revez an dazgwered-se nemet gant ar sifiliteion.
- porine** ◇ **porin** ◇ **porin** g. Gant bazheloù gram nac'hek 'zo, protein koc'henn o kevaraezañ treizh an ion ha molekul bihan dourlen all.
- porion** ◇ **porion** ◇ **porion** g. Er c'hloppennvuzulierezh, poent loet e-kreiz ribl krec'h ode diavaez ar c'hleved.
- porocéphalose** ◇ **porocephalasis** ◇ **porokefaloz** g. Kleñved devoudet gant an hogennadur er bevedeg eus larved *porocephalus armillatus*, araknid eus urzhad al linguatul. E gavout a reer gant henvroiz Afrika hag erzerc'hañ a ra, pe dre un aroad falezhez rizhek, pe dre un azoniad iktor grevus (sl. *linguatulose*).
- porofolliculite** ◇ **porofolliculitis** ◇ **bolc'hennfo** g. **blevel**, **savnvolc'hennfo** g. Bolc'hennfo ar savnigoù diwar stafilokok, o naouiñ dre ur urbuennig, ur vlevenn en he c'hreiz (sl. *folliculite*).
- porokératose** ◇ **porokeratosis** ◇ **porokeratoz** g. Kroc'henañez prin treuzkaset ent aotozomek trec'hek oc'h anadiñ er bugel-vezh hag o naouiñ dre blakennoù pe isteñvek heñvel da welout ouzh al lupuz eritematus, pe hiriset a valiroù ha pikernennoù kornvanek. Bevennet eo ar plakennoù-se gant un andell epiderm kleuziet gant ur riesenn, enni ur vevenn gornvanek; en ervez emaint da gankraat.
- porokératose papillomateuse** ◇ **porokeratosis** ◇ **porokeratoz** g. **papillomaouek** Ar porokeratoz papillomaouek a rizh Mantoux zo un daskenad a geratoz palv-sol ganedigel ha hêrezhel, naouus dre vezañs eus enezigoù kornvanek paot milier kleuziet gant gobigoù bihan.
- porome eccrine** ◇ **eccrine poroma** ◇ **porom** g. **gorrevorc'hat** Yoc'henn groc'hen kuñv, sezet ar peurliesañ war sol an troad, evodet diouzh san degorzhañ ar gwagrennoù c'hwezpar gorrevorc'hat (sl. *yoc'henn Pinkus*).
- porose cérébrale** ◇ **cerebral porosis** ◇ **rouezad** g. **empenn**, **empennrouezad** Anaf kelanel eus an empenn kavet er c'helanel-weliñ sevenet e-pad an hañv. C'hoarvezout a ra eus lies kleuzenn amorc'het, a vent gant ur bizenn, d'ar muiañ gant ur graoñenn gelvez, eskantet er poull vigelc'hiek, e kangrennoù ar c'hef simpatek, er pont, o reiñ d'an empenn an neuz deskrevet dindan an anv a *stad ar c'heuz gruyère*. Devoudet eo gant tiñvidigezh garvevion anaerat.
- porphine** ◇ **porphin** ◇ **porfin** g. Luniad diazez furmet gant peder c'hraoñell pirol ereet dre bontoù karbon, oc'h amparañ bonad ar porfirinoù.
- porphyrie** ◇ **porphyria** ◇ **porfiriezh** b. -où Termen o vodañ ur stroll erzerc'hadoù kleñvedel devoudet gant ur migennevid eus ar porfirinoù. Ar re vuianiverek eo ar porfiriezhoù hennadek hêrezhel pe kentael, e dalc'h divig unan eus an enzimoù ret da enaoz al livegennoù-se. Liesseurt eo o erzerc'hadoù klinikel, e par ar c'hroc'hen dreist holl. hervez sez an ezreolder e tigemmer ar porfiriezhoù avuien hag ar porfiriezhoù ruzparien. (sl. *coproporphyrrie*, *protoporphyrrie*, *protoporphyrrie*, *pseudoporphyrrie*).
- porphyrie aiguë intermittente** ◇ **acute intermittent porphyria** ◇ **porfiriezh lemm spanaennek** Anaer tiegezhel hervez ar mod aotozomek trec'hek a-zalc'h gant un divig hidroksimetilbilan sintetaz, o tedreiñ gant an oadour dre varradoù (devoudet a-wechoù gant ar barbitureier) azonet gant laurioù kof grizias, direizhoù nerval ha bredel. En troazh ez eus kementadoù bras a borfobilinogen hag a uroporfirin.
- porphyrie cutanée tardive de Waldenström** ◇ **porphyria cutanea tarda** ◇ **porfiriezh kroc'henek aroadat Waldenström** An hini voasañ eus ar porfiriezhoù avuien o naouiñ dre ul luc'hgizidigezh, dinodadur gloevennoù e par an tachadoù kroc'hen en ardizh, un azoniad kof lemm, strafuilhoù nervbredel hag un diouladur uroporfirinou. Anaer treuzkaset war ar mod aotozomek trec'hek a zo delanket ar barradoù anezhañ gant kemeradur liaoù 'zo pe alkool.
- porphyrie érythroïétique congénitale, maladie de Günther** ◇ **congenital erythropoietic porphyria** ◇ **porfiriezh b. ruzparien ganedigel, kleñved** g. **Günther** Anaer ganedigel treuzkaset war ar mod aotozomek enkliek o naouin dre kroc'henañezhoù (gloevennoù, eritemoù), o tiwanañ da-geñver un ardizhad ouzh an heol, dre un amwad a rizh loezadel ha dre un diouladur muiek a uroporfirin. Doare grevusañ ar porfiriezhoù o kas d'ar marv kent 30 vloaz.
- porphyrie variegata, mixte** ◇ **porphyria variegata** ◇ **porfiriezh kemmesk** Porfiriezh avuien treuzkaset war ar mod aotozomek trec'hek, o kevredañ azoniou ar borfiriezh lemm hag ar borfiriezh kroc'henek aroadat.
- porphyrine** ◇ **porphyrin** ◇ **porfirin** g. Nep kediad deveret eus ar porfin, e liv ruz kreñv (livegenn), paot kenan er bevedegoù loenel ha struzhel.
- porphyrinémie** ◇ **porphyrinemia** ◇ **gwadporfirinegezh** b. Bezañs porfirinoù er gwad.

- porphyrinurie** ◇ **porphyrinuria** ◇ **troazhporfirinegezh** b. Ezvevennadur porfirinoù en troazh, a gemer neuze ul liv ruz mouk naouus.
- porphyrisation** ◇ **porphyzation** ◇ **hueekaat** Puzuilhañ un danvezenn liael ouzh he frikañ e stumm hue tanav.
- porracé** ◇ **porraceous** ◇ **glas** aa. **pour** Glas evel ar pour.
- porrigo** ◇ **porrigo** ◇ **porrigo** g. Termen dispredet o teanviñ lies anaez eus ar brigenn, an tagn peurgetket.
- Porro** : opération de ~ ◇ **Porro's cesarean section** ◇ **gwezh** g. **Porro** Kalvezder kezarian dre ar forzh kofel heuliet gant ur c'hrozhezvenañ gouhollel gant marsupelaat ar voñsenn c'houzougel.
- Porta** : grains de ~ ◇ ◇ **greun Porta** Greunennadoù oc'h amparañ an angiomm eeun o c'hoarvezout o unan eus goustelladoù korrwazhied.
- portage** ◇ **portal** ◇ **dougerezh** g. Reiñ bod da c'harvevion kleñvedus a-berzh ur gouzrec'h yac'h evit doare.
- portal** ◇ **germ-carrying** ◇ **porzhel** aa. A-zave d'ar wazhienn borzh pe d'ar reizhiad porzh.
- porte d'entrée** ◇ ◇ **entova** g. Lec'h enteñ ar garvevion er bevedeg.
- porte-aiguille** ◇ **needle holder** ◇ **doug** g. -où **nadoz** Gevel kenvelladus a fest hag a zalc'h un nadoz da seveniñ ur c'hrafaelad.
- porte-caustique** ◇ **caustic carrier** ◇ **doug** g. **ezuzenn** Benveg a gevaraez dewerc'hañ un ezad.
- porte-ligature** ◇ **porte-ligature** ◇ **doug** g. **argoulm** Gevel arveret da gas un argoulm en ur gavenn don da-geñver ur wezhiadenn surjiañel.
- porte-mèche** ◇ ◇ **doug** g. **poulc'henn** goustil en e benn ur forc'h a gevaraez ensoc'hañ ur boulc'henn en ur gavenn pe ur fic'h.
- porteur** ◇ **carrier** ◇ **simiad** g. -où Danvezenn brotidedek pe polisakaridedek a rank un haptenn kevredañ outi evit gounit un antigened.
- porteur de germes** ◇ **germ carrier** ◇ **douger** g. **ion hadennoù** gouzrec'h a zo en e ziouladoù garvevion kleñvedus hag a c'hell treledañ kleñvedoù tredizhus, evel an tifoid, ar pilhonfo empenn-livenn hag an diferiezh. Digenmañ a reer : 1 an *douger henek* (sz. *chronic carrier*) a bad e stad douger pell amzer ; 2 an *douger arbareat* (sz. *convalescent carrier*) a ro bod da hadennoù kleñvedus tra m'emañ o tigliañvañ pe o yac'haat ent klinikel diouzh ar poreadur ; 3 an *douger gounervezhat* (sz. *incubation period carrier*) a zo o reiñ bod da hadennoù kleñvedus hep bezañ diskleriet ar c'hleñved e-pad ar gounervezh hag erziwezh 3 an *douger yac'h* (sz. *healthy carrier*) a zo tizhet gant ur poreadur a chom enketat e-doug e zedroadur en e bezh.
- porto-cave** ◇ **portocaval** ◇ **porzh-kav** aa. A-zave d'ar wazhienn borzh ha d'ar wazhienn gav izelañ.
- portographie** ◇ **portography** ◇ **porzhluniñ** Skinluniñ kef ha barroù ar wazhienn borzh ensinklet enno un xdemerenn e-doug ur felc'hporzhluniñ pe war-eeun e-doug ur wezhiadenn surjiañel.
- portohépatographie** ◇ **portohepatography** ◇ **porzhavuluniñ** Skinluniñ ar wazhienn borzh (kef ha barroù) hag an avu ensinklet enno un Xdemerenn.
- portomanométrie** ◇ **portomanometry** ◇ **porzhgwaskventerezh** g. Muzulierezh ar gwaskoù er reizhiad porzh.
- portrait parlé** (« formule signalétique ») ou « signalement descriptif ») ◇ ◇ **poltred** g. **geriet**, pe **denaouad** g. **ditouriñ** pe **ditour** g. **deskrivañ** Deskrivadur urzhiet ha pervezh eus naousterioù ditouriñ un hinienn e-sell d'he fivadiñ.
- Posada-Wernicke** ou **Posada-Rixford** : maladie de ~ (sl. **coccidioidomycose**).
- positif** ◇ **positive** ◇ **1 yaek** aa. **2 yaeg** g. 1 A-zivout ur proudad dioumat, ur proudad brazedded a c'hell bezañ gwir (*gwiryae*) pe gaou (*gaouyaek*). 2 Gouzviad dezhañ ur proudad yaek ; evit ar *gaouyaeg*, -ez ez eo ezvezant an arbenn (kleñved, brazedded), tra ma 'z eo bezant gant ar *gwiryae*, -ez.
- position** ◇ **position** ◇ **1 emlakadur** g., **emstumm** g. (**klañvour**) **2 loadur** g., **lakadur** g., **savlec'h** g. (**organ**, **korf**) **3 erload** g. (**gwilioud**) 1 Emzalc'h, savlec'h kemeret gant ur c'hlañvour, ent emdarzhiek pe evit ur pal savelet. 2 Savlec'h, lakadur an organ, un ezel, ar c'horf en e bezh 3 En amiegouriezh, keñver a zo etre parzh korf ar grouell da geñver ar gwilioud ha spislec'hioù lestr ar vamm (sl. *décutitus*, *présentation*).
- position anatomique** ◇ **anatomical position** ◇ **loadur** g. **korfadurel** Emzalc'h dave korf an den er gorfadurezh deskrivadurel, eleze al loadur war sav sonn, palvoù dorn war raok.
- position de fonction** ◇ **functional position** ◇ **loadur** g. **arc'hwelel** Loadur ur c'henvell e degouezh un diloc'hekadur hirbad a zevoud an andrafted an nebetañ diaezus evit ar gouzviad.
- positionnement** ◇ **positioning** ◇ **desezañ**, **ensezañ**, **destalañ**, **savlec'hiañ**, **loañ**.
- positron, positon ◇ positron ◇ pozitron s. Rannig elfennel he zolz par da hini an elektron o tougen ur bec'hiad par da hini an elektron, gourzharouez avat (sl. *tomographie par émission de positons*).
- Posner-Schlossmann** : syndrome de ~ ◇ **Posner-Schlossmann syndrome** ◇ **azoniad** g. **Posner-Schlossmann** Azoniad erzerc'h dre frapadoù adfeillus glaokom ha koraelfo.
- posologie** ◇ **1 dosage** **2 posology** ◇ **1 doen** g., **doenad** g. **2 doenouriezh** b. 1 Kementad eus ul lia da ziounit un pe lies gwech e-doug prederiadur ur c'hleñved 2 Kevrenn eus ar yac'hadouriezh a studi doenadoù ha modelezhoù diounit al liaoù.

posologique ◇ **posologic** ◇ **1 doenel aa., doenadel aa. 2 doenouriel aa.** 1 A-zave d'an doen pe d'an doenad 2 A-zave d'an doenouriezh.

post abortum ◇ **post abortum** ◇ **post abortum** Bomm latin o talvezout "goude ar sioc'hanad".

post-charge ventriculaire ◇ **ventricular afterload** ◇ **goudekarg b. kofigel** Gwask ouzhpenn rekis d'ar c'hofig da beurskarzhañ e endalc'had.

post cibum ◇ **post cibum** ◇ **post cibum** Bomm latin o talvezout "goude ar pred boued".

post-coïtal : test ~ ◇ **postcoital test** ◇ **prouad g. goude keventrac'h** (sl. *Huhner : test de* ~).

post-commissurotomie : syndrome ~ ◇ **postcommissurotomy syndrome** ◇ **azoniad dianfreilhenbenañ** Azoniad foel o c'hoarvezout un nebeut sizhunvezhioù da heul ur freilhenben, o naoñ dre un derzhienn, bruskostoù, ur grezennamalonennfo hag arzostoù; anadiñ a ra un ustizh gouzediñ ruzkelligel, un elwenn gant granulokitusriñv. Dedreiñ a ra etrezek ar pare en un nebeut devezhioù pe un nebeut sizhunvezhioù ha ne gevaraez ket adfeilh an isvoll mintrek. An un azoniad a c'hell c'hoarvezout ivez goude oberatadennoù kalongwazhiedel enbruskel all, pezh a gantreizh an anvadoù hollekoc'h a *azoniad diangalonnenbenañ* (Gl. *syndrome post-cardiotomie*), pe a *azoniad dianamgalonnenbenañ* (Gl. *syndrome post-péricardiotomie*), pe a *azoniad dianvruskenbenañ* (Gl. *syndrome post-thoracotomie*). Tennañ a ra kalz da azoniad Dressler.

post-commotionnel : syndrome ~ ◇ **postconcussion syndrome** ◇ **azoniad dianargrad** (sl. *commotionnel : syndrome* ~).

post-critique ◇ **postcritical** ◇ **dianvarrad aa.** O tont war-lerc'h ur barrad (droukfell, ent dibarek).

post-cure ◇ **aftercure** ◇ **diangur b.** Prantad andreuziñ etre dibenn ur gur hag an distro d'ar vuhez oberiat, ma rener un evezhierz mezegel. An termen-mañ a arvered gwechall e-keñver an dorzhellegezh : goude an herberc'hiadur er c'hurva (sanatorium) ez ae an dorzhelleion arbaret d'an diangurva. Hiziv e reer gantañ kentoc'h evit an alkooleion (sl. *centre de post-cure*).

post-embryonnaire ◇ **postembryonic** ◇ **gouderizhellel aa.** O tont war-lerc'h al lankad rizhellel.

post-encéphalitique ◇ **postencephalitic** ◇ **dianempennfo aa.** A c'hoarvez er prantad diouzhtu da heul ar c'hanedigezh.

postérieur ◇ **posterior** ◇ **adreñv aa., drek-** A zo loet a-dreñv

postérieur

- *inclinaison postérieure des alvéoles* drekstouad al logigoù, stouad war dreñv al logigoù
- *présentation postérieure* erload a-dreñv
- *syndrome postérieur du bulbe* azoniad adreñv an hirvel.

postéro- ◇ **postero-** ◇ **drek-** Rakger o talvezout "a-dreñv"

NOTENN : drek- + sonenn → dreg-.

post-excitation : syndrome de ~ ◇ **postexcitation syndrome** ◇ **azoniad g. dianvroud** Migorvezioù kofigel grevus o c'hoarvezout e miwe ar c'hofig dehou pe war-lerc'h angwazhiad ar c'hahe kalon ha devoudet gant tredanvarroù goulerc'hat a zo dezerc'had tredanel un tachad tredanren gorrekaet dec'hanus da adenankadoù.

post-ganglionnaire ◇ **postganglionic** ◇ **goudekangrenn(el) aa.** Gant ul loadur pellek e-keñver ur gangrenn, evit a sell an nervwiennoù dreist holl.

post-gravidique ◇ **postgravidic** ◇ **goude bec'hiegi, goudebec'hiegel aa., goudebec'hiegvezhel aa.** A c'hoarvez war-lerc'h ar vechiegi (sl. *syndrome de Chiari-Frommel*).

posthectomie ◇ **posthectomy** ◇ **amdroc'hañ** Gouvenañ darnel pe holl el eus ar veskenn (sl. *circumcision, posthétotomie*).

post-hépatitique ◇ **post hepatitis** ◇ **dianavufo aa.** A c'hoarvez da heul un avufo.

posthioplastie ◇ **posthioplasty** ◇ **beskennatelviñ** Surjianerezh atelviñ a' r veskenn.

posthite ◇ **posthitis** ◇ **beskenno g.** Tanijenn a' r veskenn.

postholithe ◇ **postholith** ◇ **beskennvaen g.** Grouanenn veskennel.

posthume ◇ **posthumous** ◇ **1 dalif aa. 2 dalif aa. & g. -ed** 1 O c'hoarvezout war-lerc'h ar marv 2 Ganet war-lerc'h marv e dad.

post-hypophysaire ◇ **neurohypophyseal** ◇ **drekougorfenn(el) aa.** A-zave d'an drekgougorfenn. Sk. hormon drekgougorfenn.

post-hypophyse ◇ **neurohypophysis** ◇ **drekougorfenn b.** Parzh adreñv ar c'hougorfenn (sl. *neurohypophyse*).

post-image ◇ **after-image** ◇ **dianlouc'h aa.** Skeudenn dreistpadek war-lerc'h ur c'hentrigad a 'l luc'hsae. An dianlouc'hou a vez arveret da studiañ al loarkrevezhioù (kevaraezañ a reont andalañ kenglot al luc'hsaeoù) ha da brederiañ ar bouc'hwel.

post-infarctus du myocarde ◇ **Dressler's syndrome** ◇ **azoniad dianangwazhiad kalon** (sl. *Dressler : syndrome de* ~).

post-maturité ◇ **post-maturity** ◇ **bec'hiegvezh b. askouezhet** (sl. *grossesse prolongée*).

post-maxillaire ◇ **postmaxillary** ◇ **goudekarvanel aa.** Loet a-dreñv ar garvan.

post-ménopausique ◇ **postmenopausal** ◇ **dianvizpaouezel aa.** O c'hoarvezout goude ar paouez mizioù, da skouer an askornrouezad dianvizpaouezel.

post-menstruel ◇ **postmenstrual** ◇ **dianviziaouel** aa., **dianvizliñvel** aa. Da heul ar mizioù, sk. : prantad dianviziaouel (dianvizliñvel) pe *dianvizliñvezh*.

post-mictionnel ◇ **postvoiding** ◇ **goudedezioulad(el)** aa. A c'hoarvez war-lerc'h an dezioulad, sk. : skinluniñ goudedezioulad.

post-mortem ~ ◇ **postmortem** ◇ **goude marv(el)** aa. Goude ar marv.

postnatal ◇ **postnatal** ◇ **goudeganedel** aa. A c'hoarvez er prantad diouzhtu da heul ar c'hanedigezh.

post-nécrotique ◇ **postnecrotic** ◇ **dianvarvennad** aa. (sl. *cirrhose post-hépatitique*).

postœstral ◇ **postœstral** ◇ **diandarvezhel** aa. A-zivout an darvezh.

postœstrus ◇ **postœstrus** ◇ **diandarvezh** g. Unan eus lankadoù an dargor (sl. *cycle œstral*).

postopératoire ◇ **postoperative** ◇ **diansurjanel** aa., **goudesurjanel** aa. Gant ar rakger *dian-* e vez graet da zec'heriañ ar c'heñver a zianlenad da raklenad ha gant ar rakger *goude-* da verkañ ar savlec'h "da heul" en amzer pe en egor. Da skouer e vo komzet eus *bleuz diansurjanel* hag eus *arouelioù goudesurjanel*.

post-partum ◇ **postpartum** ◇ **1 dianwilioud** aa. **2 dianwilioudvezh** g. 1 Goude ar gwilioudiñ 2 Prantad da heul ar gwilioud ma c'hoarvez gant bevedeg ar vamm, treuzfurmet gant ar vec'hiegi hag ar gwilioud, kemmoù amkanet d'e zistreiñ d'ar stad reel. Kregiñ a ra goude ar gweleskar ha padout a ra eus 6 da 8 sizhunvezh.

post-pneumonique ◇ **postpneumonic** ◇ **dianskeventfo** aa. Da heul ar skeventfo.

post-prandial ◇ **postprandial** ◇ **goudepred** aa. & g. -où, **goudepredel** aa. A c'hoarvez war-lerc'h ar predoù

post-prandial

- *en période post-prandiale* e doug ar goudepredoù

post-synaptique ◇ **post synaptic** ◇ **goudesinaps(el)** aa. Loet en ardraoù ur sinaps.

post-traumatique ◇ **postconcussion** ◇ **diandaraez** aa. A c'hoarvez da heul un daraez, a zo un dianlenad anezhañ.

postulat ◇ **postulate** ◇ **kentread** g. Kentaenn darbennet da ziazezañ un dienadur.

postural ◇ **postural** ◇ **1 loadurel** aa. **2 diaboz** aa. 1 A-zave da loadur ar c'horf, sk. : *gwehenniñ loadurel* 2 A-zivout an tant emstumm a gevaraez derc'hel ar c'horf en ur pozad dave, evel al loadur war sav.

posture ◇ **posture** ◇ **1 emstumm** g., **diaboz** g., **pozad** g. **2 loadur** g., **emstumm** g., **emlakadur** g., **lakadur** g., **neuz** g., **dalc'h** g. 1 Savlec'h bloc'hel hollad an hanrannoù korf en ur pred lavaret. 2 Savlec'h yac'hadel, emstumm dibarek hep pe gant teloc'hyac'haat (sl. *attitude*).

posturographie ◇ **posturography** ◇ **posturografiñ**, **loadurwezañ** Kalvezder erc'hwiliañ ar c'hempouez dre lerc'hwezañ luskelloù loadurel ur gouzrec'h.

Potain : **signe de** ~ ◇ **Potain's sign** ◇ **arouez** g. **Potain** Astenn tachad trommder — an drommenn — gwareg an aortenn, eus dornell ar glerenn betek an trede migorn dehou a 'r gostezenn, e degouezh usvoll an aortenn.

potasse ◇ **potassium hydroxide**, **potash** ◇ **hidroksidenn** b. **galiom**, **kali** g. Hidroksidenn galiom, KOH he delun, danvezenn sonnel, gwenn ha dic'hwezh, hezileizh en dour ha dezhi perzhioù bazek kreñv. arveret e vez evel kediuzenn.

potassium ◇ **potassium** ◇ **kaliom** g. Metal alkaliiek, tost d'an natriom, orjalennus ha blot. Niverenn atom 19, tolz mol atom 39,102. Ar c'haliom zo un elfenn barzhiat bonel eus ar bevedegoù loenel ha plantel (e rezh ion K⁺ er c'hitoplasm kelligel). Kalz a haliou anezhañ a vez arveret er vezekniezh.

potassium : **acétate de** ~ ◇ **potassium acetate** ◇ **aketat** g. **kaliom** Alkaliuzenn troazhel.

potassium : **bicarbonate de** ~ ◇ **potassium bicarbonate** ◇ **bikarbonat** g. **kaliom** Hal e zelun KHCO₃, eneprenkeg ar stomok.

potassium : **bichromate de** ~ ◇ **potassium bichromate** ◇ **bikromat** g. **kaliom** Danvezenn ezus — ezuzenn — danvezet e rezh dileizhenn evit mirerezh ar gwiadoù hag evit prederiañ kroc'henadoù 'zo.

potassium : **bitartrate de** ~ ◇ **potassium bitartrate** ◇ **bitartrat** g. **kaliom** Hal strinkennek gwenn, danvezet er vilvezekniezh.

potassium : **bromure de** ~ ◇ **potassium bromide** ◇ **bromidenn** b. **galiom** Hal strinkennek, e zelun KBr, hezus hag enepdroukfell.

potassium : **carbonate de** ~ ◇ **potassium carbonate** ◇ **karbonat** g. **kaliom** Hal gwenn, e zelun K₂CO₃, arveret evel eneprenkeg.

potassium : **chlorure de** ~ ◇ **potassium chloride** ◇ **kloridenn** b. **galiom** Hal strinkennek, e zelun KCl. Arveret e vez evel araez enankañ ion kaliom, evel troazhusvorc'her hag evel erlec'hiad ar gloridenn natriom en hanrenoù hep hollen.

potassium : **citrate de** ~ ◇ **potassium citrate** ◇ **kitrat** g. **kaliom** Hal gwenn, troazhusvorc'her hag eneprenkeg.

potassium : **cyanure de** ~ ◇ **potassium cyanide** ◇ **kianidenn** b. **galiom** Hal gwenn, e zelun KCN, pistriek kenan, arveret evel amprevanlazher.

potassium : ferrocyanure de ~ ◇ **potassium ferricyanide** ◇ **ferrokianidenn** b. **galiom** Hal strinkennek melen, pistriek, arveret evel kediuzeñ imbourc’hva.

potassium : glycérophosphate de ~ ◇ **potassium glycérophosphate** ◇ **glikerofosfat** g. **kaliom** Hal gwenn, arveret hep ken tra en ergurañ hag er c’hurañ a’n asikted hag a’r c’haliomwadisvec’h (negeziou a orin koazhadel, lounezhel pe enborc’hadel). Kevredet gant meinnoù all (kalkiom ha magnezium) en en arverer en angevezhioù adnerzhus (dileizhadou, sirosoù).

potassium : hydroxyde de ~ ◇ **potassium hydroxide** ◇ **hidroksidenn** b. **galiom** (sl. *potasse*).

potassium : iodate de ~ ◇ **potassium iodate** ◇ **iodat** g. **kaliom** Hal a zelun KIO_3 arveret evel kediuzeñ imbourc’hva.

potassium : iodure de ~ ◇ **potassium iodide** ◇ **iodidenn** b. **galiom** Hal diliv a zelun KI a c’haller entoueziañ en holen kegin hag en dour evañ (degasadenn iod).

potassium : nitrate de ~ ◇ **potassium nitrate** ◇ **nitrat** g. **kaliom** Hal strinkennek a zelun KNO_3 , troazhusvorc’hus.

potassium : permanganate de ~ ◇ **potassium permanganate** ◇ **permanganat** g. **kaliom** Hal strinkennek ruz-mouk, a zelun $KMnO_4$. Oksider, dilester ha dilouezer arver diavaez e dileizhennoù tanav.

potassium : sulfate de ~ ◇ **potassium sulfate** ◇ **sulfat** g. **kaliom** Hal strinkennek a zelun K_2SO_4 ; spurjuzeñ.

potassium : tartrate neutre de ~ ◇ **potassium tartrate** ◇ **tartrat neptu** g. **kaliom** Hal strinkennek gwenn, troazhusvorc’hus ha spurjus.

potentialisation ◇ **potentiation** ◇ **derialañ**, **derial** g., **derialerezh** g.; **kedal** g. **nerzhañ**; **gougeinañ** Rizh kedal liael ma ’z eo brasoc’h ar gwered hollel eget sammad gweredoù ketep al liaoù kevredet (sl. *synergie renforcatrice*).

potential-

- *potentialisant l’action de l’insuline* o c’hougeinañ gwered an insulin.

potentiel ¹ ◇ **potential** ◇ **galloudel** aa. A revez e galloud, eleze dianat pe diwered, hogen en ervez da erzerc’hañ pe da vont e gwered.

potentiel ² ◇ **potential** ◇ **barr** g. -où Barregezh da ren un ober, ur gwered. Ent dibarek, ar barr tredan zo ur braster naouus da stad tredanel ur poent, ur metoù. Ne c’haller e zezverkañ nemet a-geñver gant ar stad tredanel o ren en ur poent all ha neuze e komzer eus kemmoù barr — tredanvarr —, dewerzhet e voltou.

potentiel

- *les potentiels du bras* barroù ar vrec’h • *petites différences de potentiel* kemmoù barr munut • *potentiel électrique* tredanvarr
- *variation de potentiel* argemmad barr • *diabète potentiel* diabet galloudel.

potentiel autonome ◇ **self potential** ◇ **unanvarr** g. Tredanvarr oc’h erzerc’hañ a-emdarzh en neuronou, dizalc’h diouzh nep fraouadur.

potentiel bioélectrique ◇ **bioelectric potential** ◇ **barr** g. **bevdredanel** Nep tredanvarr oc’h erzerc’hañ da-geñver un adenn vevel.

potentiel d’action ◇ **action potential** ◇ **barr** g. **gwered** Tredanvarr trelede a-hed un akson pe ur gaherwienn dindan gwered un tredanfraouadur dezhañ ur read spirus (gwehin).

potentiel de membrane ◇ **membrane potential** ◇ **barr** g. **kennenn** Kemm barr a zo etre daou dal ur gennenn, koc’henn ur gellig da skouer.

potentiel de repos ◇ **resting potential** ◇ **barr** g. **paouez** Tredanvarr ur gennenn vev e diouer fraouaat.

potentiel évoqué ◇ **evoked potential** ◇ **barr** g. **dianfraou** Erwezh tredanel eus an nervreizhiad da heul ur fraouadur skiantennel delanket (gweledel, klevedel pe santadel). Anadiñ a ra a-benn un nebeud milieilenoù e rezh gwagennoù naouus. Lerc’hwezet eo an tresenoù-se diwar-bouez elektrodoù loet e-tal tachadoù skiantennel an empenn (empennvarrwezd), al luc’hsae (luc’hsaevarrwezd) pe ar forzhioù klevled (melc’houedennvarrwezd), pe c’hoazh war ar poentou o klotañ gant ar c’hef nerval imbourc’h et (nervennvarrwezd). Neuz ar gwagennoù, pa anadont, a vez daskemmet e degouezh direizhoù war an treugou trobarzhel pe kreizel eus ar forzhioù gweledel, klevedel pe korferaezadel.

potion ◇ **potion** ◇ **died** g. **liael**, **liadied** g. mestragevezh liñvel, sukret, erbaret da vezañ diounezet dre euvriñ.

potomanie ◇ **psychogenic polydipsia** ◇ **diedvar** g. Mireal o naouiñ dre ar boaz da evañ kementadoù reñverek a liñvennoù.

Pott : **fracture de** ~ ◇ **Pott’s fracture** ◇ (sl. *fracture de Dupuytren*).

Pott : **mal de** ~ ◇ **Pott’s disease** ◇ **anaez** g. **Pott** Torzhellegezh vellennel o tizhout ar peurliesañ un disk etre-melloù hag an daou gorf mellenn kefin.

Pottenger : **signe de** ~ ◇ **Pottenger’s sign** ◇ **arouez** g. **Pottenger** Reuter kaherel arsellet er skevent- ha krezanaezioù foien.

Potter : **syndrome de** ~ ◇ **Potter’s syndrome** ◇ **azoniad** g. **Potter** Azoniad kammneuziad o naouiñ dre un anpar lounezh daoudu o tevoudañ, e-korf un nebeud devezhioù, marv an nevezehaned (gouevr ar peurliesañ) en un daolenn antroazh; a-wechoù ez eo ar bugel marc’h-hanet. Ambrouget eo gant un neuz dremm dibarek : tal ledan gant usregad etrelagadel, epikantuz, fri plat ha ledanaet, divskouarn sezet izel, elgez puket; a-wechoù ivez iswe ar skevent, ar forzhioù troazhañ izel hag an organoù genel.

Potts, Gibson et Smith : opération de ~ ◇ **Potts, Gibson and Smith operation** ◇ **oberatadenn b. Potts, Gibson ha Smith** Oberatadenn amkanet, evel hini Blalock-Taussig, da wellaat an oksigenañ e degouezh a gleñved glas. Kreskiñ a ra kas ar gwad aortek divec'hiet a-zarn d'ar skevent da vezañ oksigenet. C'hoarvezout a ra a zasforzhañ tu-ouzh-tu an aortenn gant an dalmerenn a-skevent kleiz.

pou ◇ **louse** ◇ **laouenn** u. (s. **laou**) Amprevaned apter, gwadezat, arvevat ouzh mab den. Bez' ez eus tri spesad anezho : *pediculus capitis* (laou penn), *pediculus corporis* (laou korf) ha *phthirus inguinalis* (laou faraon pe laou pafalek). Dec'han a ra al laou un dermatoz debronek anvet hervez an degouezhioù laouegezh pe laouigenn, ha gallout a ra trezougen poreoù diseurt : an tifuz eksantematek, an derzhienn Q, an derzhienn arreadek bedvroat ha terzhienn ar foziou.

pouce ◇ **1 thumb 2 inch** ◇ **1 meud** g. -où **2 meutad** g. -où 1 Kentañ biz an dorn, an hini ar muiañ war ar c'hostez eus ar pemp biz, keharpus ouzh ar re all. Daou oeñs zo dezhañ hepken 2 Unanenn regad angl-ha-saoz par da 25,4 mm.

pouce : **signe du** ~ ◇ **1 Klippel-Weil sign 2 Froment's paper sign** ◇ **1 arouez** g. **Klippel ha M.P. Weil 2 arouez** g. **ar meud** 1 Gant al ledseizidi tizhet gant argrezadoù e stader ez a ar meud war bleg ent emdarzhzek pa saver ar pevar biz all, pe unan anezho hepken. N'eus ket eus an arouez-se el leddargrezad droukfellel 2 (sl. **signe du journal, signe de Froment**).

pouce à ressort ◇ **trigger thumb** ◇ **meud** g. **diaskat** (sl. **doigt à ressort**).

pouce en Z ◇ **meud** g. **e Z** Distummadur ar meud o kevredañ un dreistastennadur eus ar c'henvell etre-oeñsoù hag ur plegadur eus ar c'henvell kreizdorn-oeñsoù, arsellet el liesarzo rumatoidel.

poudre ◇ **powder** ◇ **poultr** g. Danvezenn sonnel (kimiek pe liael) lakaet e rannigoù tanav kenan hag unvan.

pouliethérapie ◇ **pulley therapy** ◇ **polegurañ** Hentenn alvezkurañ oc'h averañ trevnadoù poleoù, funioù ha tolzennoù, kevaraezus da ren loc'hadoù a-enep harzderioù argemmus.

Pouliquen : appareil de ~ ◇ **Pouliquen's device** ◇ **ardivink** g. **Pouliquen** Stignadell gourfaouez dindan astenn diastal torroù penn uhelañ ar paler o kemer harp war speur ar bruska hag o sintrañ ar vrec'h war bellaat.

pouls ◇ **pulse** ◇ **pouls** g. Sav korvezek, merzhet dre deuta, eus un dalmerenn c'horre, diwar treled, a-hed speurioù an talmerennoù, eus ar wagenn edrur dec'hanez gant enorc'h ar gwad diflistret gant ar c'hofig kleiz war an aortenn a-sevel. Dre astenn ster, ec'honusted talmus ur wazhienn, an avu, h.a.

pouls abdominal ◇ **abdominal pulse** ◇ **pouls** g. **kof** Pouls an aortenn gof merzhet dre deuta ar c'hof gant ar c'houzviaded treut.

pouls allorhythmique ◇ **allorhythmic pulse** ◇ **pouls** g. **arallgorvezek** Pouls o naouiñ dre vigorvezioù taoladek.

pouls alternant ◇ **alternating pulse** ◇ **pouls** g. **pebeilat** Pouls o naouiñ dre ur c'henheuliad lammoù kalon kreñv ha gwan, oc'h erzerc'hañ un anaf eus ar c'haer kalon.

pouls amygdalien ◇ **tonsillar pulse** ◇ **pouls** g. **huegat** Lammoù sistolel en huegoù stadet e skortedoù aortek 'zo.

pouls anacrotique ◇ **anacrotic pulse** ◇ **pouls** g. **anakrotek** Pouls naouus d'an anakrotegezh (sl. **onde**).

pouls bigéminé ◇ **bigeminal pulse** ◇ **pouls** g. **gevellat** Pouls o naouiñ dre genheuliad herrek div boulzadenn, an eil kreñv hag eben gwan, ha war o lerc'h un entremez hiroc'h. An eil poulzadenn a glot gant un dreistsistol.

pouls capillaire ◇ **capillary pulse** ◇ **pouls** g. **ar c'horrwazhied pe pouls korrwazhiedel** Pebeiladur ruzder ha gwelveder a-gellusk gant ar sistoloù kalon, arsellet dreist holl e par an derm endan-ivin, pa vez skorted aortek.

pouls capricant ◇ **bounding pulse** ◇ **pouls** g. **lamm-dilamm** Pouls direolek a-stroñs.

pouls catacrote ◇ **catacrotic pulse** ◇ **pouls** g. **katakrotek** Pouls o naouiñ dre krogou bihan war wagenn diskenn ar poulzwevad.

pouls catadicrote ◇ **catadicrotic pulse** ◇ **pouls** g. **katadikrotek** Pouls o naouiñ dre zaou astennad war vann-diskenn ar poulzwevad.

pouls catatricrote ◇ **catatricrotic pulse** ◇ **pouls** g. **katatrikrotek** Pouls o naouiñ dre dri astennad war vann-diskenn ar poulzwevad.

pouls déficitaire ◇ **intermittent pulse** ◇ **pouls** g. **spanaennek** Pouls a zo e dalm bihanoc'h eget ar gorvez kalon.

pouls dicrote ◇ **dicrotic pulse** ◇ **pouls** g. **dikrotek, pouls daoulamm** Pouls a hañval pep lamm bezañ dizoublet ouzh an teuta.

pouls disystolique ◇ **disystolic pulse** ◇ **pouls** g. **disistolek** Doare pouls dezhañ ul lamm talmerel evit daou sistol kalon.

pouls fil de fer ◇ **wiry pulse** ◇ **pouls** g. **neudenn houarn** Pouls kalet dezhañ un heled bihan.

pouls filiforme ◇ **thready pulse** ◇ **pouls** g. **neudennvanek** Pouls bihan ha diaes kenan da verzhout, o reiñ santad un neudenn.

pouls grim pant ◇ **Mahler's sign, accelerating pulse** ◇ **pouls** g. **war bign** Pouls o vuanaat tamm ha tamm, hep terzhienn genveziat (**signe de Mahler**).

pouls hépatique ◇ **hepatic pulse** ◇ **pouls** g. **avuel** Koeñvadur sistolel an avu arsellet er skorted tribroudek.

pouls instable ◇ **labile pulse** ◇ **pouls** g. **distabil** Pouls herrekoc'h el loadur war sav eget en hini a-c'hourvez.

pouls irrégulier ◇ **irregular pulse** ◇ **pouls** g. **direolek** Pouls dezhañ lammoù ankeitheled pe a zo etrezo entremezioù direolek.

pouls jugulaire ◇ **jugular pulse** ◇ **poulz g. a-gerc'henn** Koeñvadur gwazhied ar c'herc'henn a-geñver gant argemmoù ar gwask kentezel dehou.

pouls lent ◇ **slow pulse** ◇ **poulz g. gorrek** Poulz a dalm gorrek, a zo niver al lammoù bihanoc'h eget ar gorvez vonan. Arsellet pa vez istead kalon, da skouer.

pouls lent permanent ◇ **permanently slow pulse, permanent bradycardia** ◇ **poulz g. gorrek pad pe trebadek, poulzistead g. pad** Kalonistead pad diwar an tolc'had kentez-kofig klok. Ar c'hofigoù a lamm diouzh ur gorvez emren, gorrek kenan, dizalc'h diouzh hini ar c'hentezioù a chom bonan. Devoudet eo atav ar c'halonistead-se gant span hordenn His (sl. *Adam-Stokes : syndrome d'~*).

pouls paradoxal ◇ **paradoxical pulse, pulsus paradoxus** ◇ **poulz g. diac'hinek** Leiadur pe steuziadur ar poulz e-doug an enanañ don. Arsellet e vez an anadenn-se e degouezh a amgalonennfo strishaus.

pouls quadrigéminé ◇ **quadrigenial pulse** ◇ **poulz g. pevarlamm** Poulz o naouiñ dre pevar lamm heuliet gant ur paouez.

pouls radial ◇ **radial pulse** ◇ **poulz g. a-werzhid** Poulz merzhet en arzorn, e par an dalmerenn a-werzhid.

pouls tricrote ◇ **tricrotic pulse** ◇ **poulz g. trikrotek** Poulz gant un daldmresenn dezhi teir gwagenn eilvedel.

pouls trigéminé ◇ **trigeminal pulse** ◇ **poulz g. trilamm** Poulz o naouiñ dre tri lamm heuliet gant ur paouez.

pouls veineux ◇ **venous pulse** ◇ **poulz g. gwazhiennel** Poulzadoù merzhet e par ar c'hefioù gwazhiennel bras, ent dibarek gwazhienn ar c'herc'henn.

pouls veineux négatif ou **normal** ou **physiologique** ◇ **negative venous pulse, physiologic venous pulse** ◇ **poulz g. gwazhiennel leiel pe bonan** Flakadur bonan gwazhienn ar c'herc'henn e-doug ar sistol kofig. Klotañ a ra gant ar c'hleuz *x* eus ar wazhiendresenn ha devoudet eo gant suc'hadur ar gwad gwazhiennel er c'hentez dehou, pa vez desachet an trapig tribroudek war draoñ gant an argrezad kofig (sl. *pouls jugulaire*).

pouls veineux ventriculaire ou **vrai** ◇ **ventricular venous pulse** ◇ **poulz g. gwazhiennel kofigel** Poulzad kerc'hennel goubred d'ar sistol kofig. Arsellet e vez er skorted tribroudek a gevaraez distro ar gwad d'ar c'hentez ha goude d'ar gwazhiennou kav.

poumon ◇ **lung** ◇ **skeventenn b., skevent s.** Pep hini eus an daou organ, dehou ha kleiz, dezho da arc'hwel oksigenañ ar gwad. Loet int e kavenn ar bruski, ouzh he leuniañ hogos en he fezh, dispartiet an eil diouzh egile gant ar poullkreiz. Ar skevent zo organoù meizh, spoueek, frankadus ha gwaskadus, e stumm kernenoù direoliek, a zo o beg a live gant ar gostezenn gentañ hag o diaz harpet ouzh ar gelec'hspurenn. Ar skeventenn dehou zo brasoc'h eget an hini gleiz ha rannet eo gant daou skarr e teir zolbezenn amgement, tra ma n'eus nemet div dolbezenn d'ar skeventenn gleiz. Amparet eo ar skevent gant un haen diavaez levrus — feilhenn a-flugez ar grezenn —, gant ur gwriad kenglenel endan-levrgenn ha gant ur parenkim furmet gant flipezennoù ar skevent keneret gant gwriad kenglenel. Pep flipezenn a c'hoarvez eus ur gorrvronkezenn — ar gorrvronkezenn enflipezenn — o skoultrennañ e korrvronkez dibenn, hag o tifourkañ e sanoiù al logigoù hag e logigoù ar skevent.

poumon cardiaque ◇ **cardiac lung** ◇ **skeventad g. kalonien** Anv roet d'an holl rouestladoù krezennskeventel diwar ar c'hleñvedoù kalon, ar skorted kofigel kleiz hag an isvoll mintrek pergen.

poumon d'acier ◇ **iron lung** ◇ **skevent dir** Kaelog metalek hestank ma veze stallet ur c'hlañvoudur tizhet gant seizi ar c'higennoù analañ. Ennañ, argemmoù gwask korvezek a drezalc'he gwenterezh kalvezadel ar skevent. Ne vez ket mui arveret.

poumon de choc ◇ **shock lung** ◇ **skeventad g. bleuz** Skorted analadel lemm o tarvezout e bogvezh pe e souzvezh ur bleuz gwadisventel (poreel ar peurliesañ). Azonañ a ra dre un analerezh herrek kenan, enkrez, kefroù, un dulaz na zereizh ket an oksigengurañ. Alias kenan e vez marvus an dedro, pe en un nebeut eurvezhioù pe dindan 2 pe 3 deiz e-kreiz ur bleuz dieiltro gant gouliñv skevent, pe dindan 10-20 devezh dre skorted analadel argreskus diwar dinodadur herrek ur fibroz entremezel ha logigel kevret gant trombozioù korrwazhiedel ha diwanadur lienenoù gwervanek el logigoù (sl. *choc, détresse respiratoire de l'adulte, membranes hyalines*).

poumon des éleveurs d'oiseaux ou **de pigeons** ◇ **shock lung** ◇ **skeventad g. an evnerion** (sl. *éleveurs d'oiseaux : maladie des ~*).

poumon évanescant ◇ **vanishing lung** ◇ **azoniad g. ar skevent arsteuz** Azoniad o naouiñ dre un dreuzwelusted war gresk eus un darn, bras pe vrasoc'h, eus ar skevent, peurliesañ un dolbezenn grec'h, hewel war ar skinnlunioù, gant rouesadur eizhañ anneauenn ar skevent. Dedreiñ a ra gorrek kenan e-pad lies bloaz hep azoniadur klinikel naouus. Kemm zo etre an azoniad-se hag an dreist-sklaeredoù diwar emfizenn pe kistoù; hañvalout a ra bezañ devoudet gant un iswe pe un angwe eus barroù kef ar skevent, ganediged moarvat (sl. *janus : syndrome de ~; macleod : syndrome de ~*).

poumon de fermier ◇ **farmer's lung** ◇ **skeventad g. ar verourion** Skeventad hangaeel a c'hoarvez gant ar gouerion o tornata struzh (foen pergen) louedet hag o tewentañ evel-se spor aktinomiket termofil, peurliesañ *thermopolyspora polyspora*. Gallout a ra dedreiñ etrezek an henegezh, o tisoc'h neuze d'ur fibroz entremezel strewek grevus kevret gant ur skorted analañ, ha goude ur skorted kalon.

poumon radiothérapique ou **radique** ◇ **radiation pneumonitis** ◇ **skeventad g. skinadien** Anafoù skevent a rizh fibroz e dianlen skinguradoù a-greñv ar bruski.

poumon en rayon de miel ◇ **honeycomb lung** ◇ **skeventad g. terenneheñvel** Kevreted demerennoù bihan strewek ha roudennoù sklaer aront arsellet e-kerz ar c'hollagenozioù, retikulozioù 'zo hag ar berillioz.

poumon tropical éosinophilique (sl. *éosinophilie tropicale*).

Pourfour du Petit : syndrome de ~ ◇ **Pourfour du Petit syndrome** ◇ **azoniad g. Pourfour du Petit** Kevredet mabusvoll, raklagadegzh, reledanded faout ar malvennoù hag a-wechoù gwelvded ha yenadur an dremm. An azoniad-se, a-c'hin da azoniad Claude Bernard-Horner, zo devoudet gant hegadur lodenn c'houzoug ar reizhiad emrennek, dec'hanet peurliesañ gant ur pennsac'h bazdovekaet pe ur c'hleñved Basedow a drec'hded untu.

pourpre rétinien ◇ **visual purple** ◇ **moug g. al luc'hsae** (sl. *érythrospine*).

poussée : épreuve ou phénomène de la ~ ◇ **push test** ◇ **proud g. ar bountañ** Damoug loadurel a arzalc'h ar c'hempouez (emgempouezañ diarzoug) pa vez ar gouzrec'h, en e sav sonn, dindan vount araok-adreñv pe war gostez. Kigennoù kostez ar c'horf ma vez embreget ar bount a argrez raktal. Steuziañ a ra an damoug-se er c'hleñved Parkinson, er midantoù emstumm, h.a.; reol e vez en ankedreoù tabelz hag ilpennel.

Pouteau-Colles : fracture de ~ ◇ **Colles' fracture** ◇ **torr g. Pouteau-Colles** Torr tredereñn izelañ ar werzhid o reiñ d'an dorn neuz kein ur forc'higell, e dianlen dilec'hiadur an draillhoù eskern war drefiv.

pouvoir ◇ **power** ◇ **barr g.; galloud g.; -usted b.; -egezh b.** Kemm a lakaer etre a) *barr* = barregezh da ren un ober bennak, b) al lostger *-usted*, damheñvelster gant a), a verk ur weredusted; c) al lostger *-egezh* a verk ur perzh enien ha d) *galloud* a verk peurliesañ ar varregezh a-berzh un organ, ur boud bev — an den da skouer — da ren un ober bennak.

pouvoir de résolution ◇ **resolving power** ◇ **diarunusted** Barregezh ur ferenn pe ur c'horrgresker da gevaraezañ gwelout daou boent nes kenan evel daou boent diouto o unan.

pouvoir rotatoire ◇ **rotating power** ◇ **c'hwelusted** Perzh danvezzennoù 'zo gweredek ent luc'honiell : teuzet pe dileizhet e c'hwelont plaenenn al luc'h bleinekaet.

Power : opération de ~ ◇ **Power's operation** ◇ **oberatadenn b. Power** Gouvenañ ul leukom eus ar gornsaes, heuliet gant un imboud kornsaes.

poxviridae ou poxviridés ◇ **poxviridae** ◇ **poksvirideged** ls. (g.) Kerentiad viruzoù gant DNA daouarrevell kemplezh o c'hemparzh hag o lumiadur, gronnet. Gavaelet eo o ment etre 230 ha 300 nm. Poreañ a reont an den ha meur a spesad bronedeg, evned hag amprevaned. Poksviruzoù 'zo zo dezho ur perzh hanweiat.

poxvirus ◇ **poxvirus** ◇ **poksvirus g. -où** Viruz eus kerentiad ar poksvirideged.

Pozzi : opération de ~ ◇ **Pozzi's operation** ◇ **oberatadenn b. Pozzi** Araezad krozhezvenañ damglok.

PPSB ◇ **PPSB** ◇ **PPSB** Berradur Protrombin-Prokonvertin-Stuart-B. Angevezh diwar ar plasma ennañ ar peder fareñn gaouledin a zo an enaoz anezho e dalc'h ar vitamin K : protrombin (pareñn II), prokonvertin (pareñn VII), pareñn stuart (pareñn X) hag ar bareñn antihemofilek B (pareñn IX). Diounezet e vez ent engwazhiennel evit strafuilhoù 'zo a 'r c'haouledin (hemofiliezh, negez ar vitamin K).

Praser et Gurtner : syndrome de ~ ◇ **Prader and Gurtner syndrome** ◇ **azoniad g. Prader ha Gurtner** Gaouerevegezh c'hourevel dre gaenuswe ganedigel (sl. *hyperplasie lipoïde des surrénales*).

Prader, Labhart, Willi et Franconi : syndrome de ~ ◇ **Prader-Labhart-Willi-Franconi syndrome** ◇ **azoniad g. Prader, Labhart, Willi ha Franconi** Azoniad ganedigel dibaot oc'h erzerc'hañ gant ar magadelled dre un istant kaherel kenrat kevret gant angremm. Goude ez anad un dilerc'h loc'hadel ha savder-pouez, ul labanded, ur gournaon gant borrdor hag alies gant diabet c'hwek. Gantañ e vez kevredet ezreolderioù dremmel (dremm arrott, daoulagad alamandezek), dentel, askomarzel (treuzwar, disvellad al lez, korrvleñchegezh, bizfle), un isganadegezh gant kelgellegezh. Marñ eo ar genrizh bonan ar peurliesañ, e degouezhioù 'zo e kaver un dilead eus brec'h hir ar c'hromozom15 (15q11-q13).

pragmato-agnosie ◇ **pragmatoagnosia** ◇ **gwelandenaoud g. an traezoù** (sl. *agnosie visuelle*).

pragmatique ◇ **pragmatic** ◇ **1 gwerc'hus aa., gwerc'heiat aa. 2 gwerc'hat aa., gwerc'hus aa., gwerc'hidik aa., gwerc'hadek aa., embregek aa.** 1 A-zivout an traoù : o tougen d'ar gwerc'hañ, a zo kevaraezus, lañsus d'ar gwerc'hañ, araezus d'an dalvezadurioù pleustrek 2 A-zivout an dud : oberiant, gant an doug d'an ober kent eget d'an tebouezañ, d'an damkanañ.

pralidoxime ◇ **pralidoxime** ◇ **pralidoksim g.** Dazniñver ar c'holinesteraz, en araez da werediñ evel gourzhaler an enepkolinesterazoù. Digontamm spesadek er pistriadur gant an amprevanlazherioù bevfosforet dezho ur gwered enepkolinesterazek.

prandial ◇ **prandial** ◇ **1 predbouedel aa. 2 predvezhel aa., e-doug ar predoù** 1 A-zave d'ar predoù boued 2 A c'hoarvez e-doug ar predoù.

-prandial-

• *post-prandial précoce* prest goude pred • *en période post-prandiale* e-doug ar goudepredoù.

Pratesi : syndrome de ~ ◇ **Pratesi syndrome** ◇ **azoniad g. Pratesi** Klefiñ spanaus un ezel traoñ diwar ur fic'h talmerenn-gwazhienn sezet e talmerenn don ar vorzhed.

praticien ◇ **practitioner** ◇ **embregour g. -ion** E Frañs, kement mezeg anarbennikaet oc'h embreger leunamzer war-dro ar glañvourion.

praticien hospitalier ◇ ◇ **embregour ospitalel** E Frañs, kement mezeg anvet dre genstrivadeg oc'h embreger en un ospital rannvro, gantañ un dezvad reolennet dre an deved eus an 24 C'hwevrer 1984, daskemmet gant hini ar 6 Mae 1988.

pratique ◇ **practice** ◇ **pleustr** g. -où Embreg ar vezekniezh hervez ar reolennoù. anv zo a “pleustrou mat”

prati-

• *pratique médicale, chirurgicale, obstétricale courante* embreg mezegel, surjaniel, amiegel plaen • *cécité pratique* dallentez pleustrel, dallentez lezennel • *pratiquer des techniques d'examen* embreger kalvezderioù imboure'h • *technique de massage pratiquée avec la paume de la main* kalvezder leuñviñ embreget gant palv an dorn • *en pratique* er pleustr • *praticien exerçant les médecines alternatives* embregour ar mezekniezhoù dazeilat • *pratiquer, effectuer* gwezhañ.

Pratt : **épreuve de** ~ ◇ **Pratt test** ◇ **proud** g. **Pratt** Kefleuñvad amkanet da spislec'hiañ, pa vez teuc'helloù, ar gwazhiennoù digonus oc'h arc'hwelañ a-gilred. Ar gouziviad o vezañ gourvezet, e c'har uhelaet e staler ur rolt e krec'h ar vorzhed (er wrizienn) hag e rodeller ur vandenn Esmarch eus troad da wrizienn an ezel. Ar c'hlañavour a lakaer goude en e sav ha, tra ma lamer ar vandenn Esmarch eus an nec'h d'an traoñ, e roller unan all diouzhtu un tammig uheloc'h. Dav lezel etre an div ul lijurennig rez, ma c'haller arseliñ ar gwazhiennoù digonus o leuniañ ar wazhienn spis.

Pratt : **signe de** ~ ◇ **Pratt test** ◇ **arouez** b. **Pratt** Bolc'hadur ar gwazhiennoù raskinel gorre e-doug gwazhiennfo gwazhiennoù kof ar c'har.

Prausnitz-Küstner : **épreuve de** ~ ◇ **Prausnitz-Küstner test** ◇ **proud** g. **Prausnitz-Küstner** Proud an darwalladegh c'houzañvat evit deznaouiñ ar stadoù darwalladel. Gant ur gouziviad na ziskouez dreistkizidigezh ebet ez ensinkler en derm : - 1° ouzh talbenn araok un arvec'h, 1/10 mL gwadvez un den kizidikaet; - 2° war an arvec'h all, 1/10 mL gwadvez un den ankizidikaet (ensinkladenn dest). Antronoz ez ensinkler dik en hevelep lec'hioù 1/10 mL eus an danvezenn gizidikaus (doughennadoù proteinek liesseurt, h.a.). Yaek eo an disoc'h pa zevoud an ensinkladenn antigen, sevenet er poent ma'z eo bet ensinklet gwadvez ar gouzrec'h kizidikaet, ur plakad linadellek er poent-se a-benn 10 min; an kez plakad zo kelc'hiet gant un tachad eritematus, debronus alies, dezhañ un treuzkiz etre 10 ha 40 cm. Padout a ra etre un 1/2 h hag 1h.

Pravaz : **seringue de** ~ ◇ **Pravaz's syringe** ◇ **strinkell** b. **Pravaz** Unan eus ar strinkelloù kentañ arveret evit an ensinkladurioù endan-groc'hen : korf ar strinkell a oa e gwer gant ur c'hebradur metal hag ur vountell e metal ivez.

praxie ◇ **praxis** ◇ **digoniñ** Kenurzhierezh reol ar fiñval diouzh ar pal mennet.

praxis ◇ **praxis** ◇ **embreger pao.**, **embreg** g. An ober e sell d'un disoc'h, kevenep d'an anaoud damkanel.

praxologie ◇ **praxiology** ◇ **oberoniezh** b. Studi oberiezhoù mab-den, al labour pergen.

préalbumine ◇ **prealbumin** ◇ **ragalbumin** g. Protein gwadvezel o tredannizhañ a-raok an albumin hag anvet bremañ trans-tiretin (sl. *transthyretine*).

préanesthésie ◇ **preanesthesia** ◇ **rakdieraeziñ** (sl. *prémédication*).

préanesthésique ◇ **preanesthetic** ◇ ~ **rakdieraeziñ**, **rakdieraez** aa., **rakdieraezadel** aa. **dieraezadel** A vez dewerc'h et pe diounezet a-raok un dieraeziñ.

pré-béta-lipoprotéine ◇ **prebetalipoprotein** ◇ **rak-β-lipoprotein** g. -où, **prebetalipoprotein** g. -où (sl. *lipoprotéine*).

prébiotique ◇ **prebiotic** ◇ **probiotek** aa., **probioteg** g. -eier Boued o pourchas un dindanad arveret gant bakteri endeuat ar pervez. Da skouer : ar gwiennoù, sukrennoù 'zo (sl. *alicament, probiotique*).

précancéreux ◇ **precancerous** ◇ **1 rakkankrek** aa. **2 rakkankrel** aa. 1 A-zivout un anaf a c'hell dont da vezañ kankrek A-zave d'ur stad a-raok ar c'hankr.

précancérose ◇ **precancer** ◇ **rakkankregezh** b. -ioù Nep anaf a c'hell dont da vezañ kankrek, nep naoued a c'hell dedreiñ trema ur c'hankr.

précancérose condylomatoïde de Unna-Delbanco ◇ **Buschke and Löwenstein's giant condylomata acuminata** ◇ **rakkankregezh** b. -ioù **kondilomatoidel Unna-Delbanco** Struzhennoù gwenerel keurel ha puilhek, diwanet war ur glaourgenn pe un amwiskad ensilet hag o vont en hanve a-benn un nebeut mizioù.

précapillaire ◇ **metarteriole** ◇ **1 rakkorrwazhied** s. **2 rakkorrwazhiedel** 1 Gwazhiennig pe dalmerennig loet a-raok ar c'horrwazhied 2 A-zave d'ar rakkorrwazhied.

précarence ◇ ◇ **raknegezh** g. -ioù Skorted danvezennoù diziouerus 'zo, gweredus a zoenadoù boc'hedel, evel halioù meinel, amindrenkennoù ha vitaminou pergen, degaset gant ar feurlod bouedel, an kez skorted o vezañ anerzerc'h ent klinikel. An termen-se a vez arveret alies evel heñvelster da *avitaminoz enkelat*.

précartilage ◇ **precartilage** ◇ **kentmigorn** g. -où, -**migern** Gwiad migornek rizhellel.

précharge ◇ **preload** ◇ **rakkarg** b. Gwask kofigel dibenn-diastol.

précipitant ◇ **precipitant** ◇ **1 dierc'heiat** aa. **2 dierc'hus** aa. **3 dierc'huzenn** b. -où 1 A-zivout un antikorff en araez da lakaat un dierc'had da ziwanañ pa ged gant an antigen keñverek 2 A-zivout un danvezenn en araez da lakaat un dierc'had da ziwanañ 3 danvezenn dierc'hus.

précipitation ◇ **precipitation** ◇ **1 dierc'hiñ** **2 dierc'hiñ** **3 koc'hioniñ** 1 Furmadur un dierc'had pa ged un antikorff gant an antigen keñverek 2 Furmadur, da heul un dazgwered kimiek, eus un dierc'had o c'houzediñ e deun al lestr 3 furmadur koc'hion er gwiadoù, er gwazhied, h.a.

précipité ◇ **precipitate** ◇ **1 dierc'had** g. -où **2 dierc'had** g. **où 3 koc'hionad** g. -où 1 Rouedad keurvolekulel tierment — un dazad o valzenniñ — a zinod pa vesker — a genfeurioù araezus hag a vec'hioù spirus — un hangawadvez pe un dileizhenn

antikorf gant un dileizhenn eus an antigen keñverek. An dazad, da gentañ a-strew en arvez liñvel, a c'houzed tamm ha tamm er meskad dazgweredel, hag edrannadus eo dre dronizhañ. E-lec'h meskañ an div zileizhenn e c'haller o arosodiñ en ur gorzenn voan. An hangaewadveiz douesoc'h o vezañ er goueled e tinod an dierc'had e stumm ur walenn danav, hewel er c'hetal etre an div liñvenn. Seurt prouad dierc'hiñ ketalel doareadel (sz. *ring test*) a vez arveret boas evel hentenn arc'hwiliañ herrek ha fizius war-benn dinoiñ an antikorfou dierc'heiat en un hangaewadveiz. N'eo nemet gant diazezadur an hentenoù kementadel da studiañ an dazgwered antikorf-antigen ma kemeras an hangaegimiezh kementadel he lañs wirion 2 Korf andileizh furmet dre zazgwered kimiek etre div pe lies danvezenn war zileizh, pe dre wered fizikel war un danvezenn war zileizh 3 Gouledad e-barzh gwiadoù, organoù, gwazhied.

précipitine ◇ **precipitin** ◇ **prekipitin** g. Antikorf a zinod, dre zagwerediñ gant e antigen keñverek, un dierc'had hewel (dazgwered dierc'hiñ) (heñvelster da *antikorf dierc'heiat*).

précipitinogène ◇ **precipitinogen** ◇ **prekipitinogen** g. Antigen en araez da zazgwerediñ gant e antikorf keñverek (prekipitin) da furniñ un dierc'had hewel (sl. *immunoprécipitation*)

-précipit-

● *précipitant les β-lipoprotéines* o tierc'hiñ ar β-lipoproteinoù ● *précipitation de sels de calcium dans les tissus* koc'hionadiñ halioù kalkiom e-barzh ar gwiadoù ● *précipité à l'intérieur du globule rouge* dierc'had e diabarzh an hemati.

précirrhose ◇ **precirrhosis** ◇ **rakirroz** g. Anv roet d'un teskad arouezioù o tiaraogiñ re ar c'hirroze hag a glot gant ur miarc'hwel avuel.

préclinique ◇ **preclinical** ◇ **raklinikel** aa. A-zave da bazenn ur c'hleñved ma n'eus arouez klinikel ebet erzerc'h evit c'hoazh.

-précoc-

● *post-prandial précoce* prest goude pred ● *appareil post-chirurgical précoce* steudellañ goudesurjanel kentrat, steudellañ prest goudesurjanel ● *la plus précoce des psychoses infantiles* ar c'hentratñ sikoz bugel ● *précoce ou prématuré* kentrat pe rakkoulz ● *la fréquence et la précocité des complications* aliested hag abredet ar rouestlodoù ● *démence précoce* envedi kentrat ● *le passage précoce du sang* tremen kentrat ar gwad ● *sénilité précoce* kozhiadegzh kentrat ● *précocité du développement physique* kantrated an diorren korfel ● *troubles provoqués précocement par les toxines* strafuilhoù devoudet a-gentrat gant an toksinoù.

précoma ◇ **initial stage of coma** ◇ **rakkoma** g. Lankad deroù ar c'homa, ma trebad ar genskiant a-zarn.

préconditionnement ◇ **preconditioning** ◇ **rageraozañ** Anadenn arnodel ma hañval un heskwad berbad gwareziñ ar c'haber kalon diouzh gweredoù ur steviadur kurunerel o padout hiroc'h.

-préconis-

● *réséction préconisée* dazbidañ ergemennet ● *préconiser la vaccination aux sujets les plus exposés* ergemenn ar vaksinadur d'an hinienoù ardzhekañ ● *méthode préconisée* hentenn ergemenn ● *opération préconisée en cas de tuberculose* oberatadenn ergemennet e tro an torzhellegezh.

préconscient ◇ **preconscious** ◇ **ragemouez** g. An termen arveret gant Freud a arouez ur reizhiad vred diforc'h mat diouzh ar reizhiad diemouez. ar ragemouez a stroll an endalc'hedoù bred na vezont ket bezant e-barzh maezienn weredel an emouezañ, a chom heziraez dezhañ avat, e kemm diouzh endalc'hedoù ar reizhiad diemouez.

précordial ◇ **precordial** ◇ **1 rakkalon** b. **2 argalonel** aa. 1 Rannbarzh er bruched loet dirak ar galon 2 A-zivout gorre ar c'horf war ar galon ha poull ar c'hreuz.

précordialgie ◇ **precordialgia** ◇ **rakkalonost** b. Laur e rannbarzh ar rakkalon.

précordium ◇ **precordium** ◇ **argalon** b. Heñvelster da rannbarzh argalonel, eleze gorre ar bruska a-us d'ar galon.

précritique ◇ **precritical** ◇ **rageizik** aa. A-raok dinod un eizigenn, ur barrad.

précurseur ◇ **precursor** ◇ **1 ragarouez** b. **-ioù 2 diaraoger** g. **-ioù** 1 Arouez a ziskouez emañ ur c'hleñved o tanzen dinodiñ 2 Aozad a zeu a-raok unan all en un heuliad dazgweredoù.

-précurs-

● *précurseur de la lignée* diaraoger an ac'had ● *le cholestérol est le précurseur des hormones stéroïdes* diaraoger eo ar c'holesterol d'an hormonoù steroidel ● *précurseur (cellules)* diaraoger da ● *activation d'un précurseur inactif* blivaat un diaraoger anniñvek ● *catalyser la formation d'une autre enzyme à partir d'un précurseur* treluskañ paridigezh un enzim all diwar un diaraoger anezhañ.

prédentine ◇ **predentin** ◇ **rakdentin** g. Danvezenn borc'het gant an odontoblastoù a ya goude, dre razekaat, da amparañ an dentin.

prédiabète ◇ **prediabetes** ◇ **1 lezdiabet** g. **2 rakdiabet** g. 1 Bezañ glukoz en troazh e diazalc'h ur strafuilh glukozarouleviañ (sl. *paradiabétique : état* ~) 2 Naouiñ a ra ar rakdiabet dre un amc'hougumer glukoz, ur glukozwadvec'h etre 1,1 g/l ha 1,26 g/l hag un hemogloblin glikosilet (pe gliket, HbA1c) gavalet etre 5,7% ha 6,4%, hervez an dezverkoù ergemennet gant Aozadur Bed ar Yec'hed. Ar rakdiabet zo ragarouez an diabet a rizh 2. Ar rakdiabeteion zo dezho ur glukozwadvec'h re uhel, rak kelligoù o c'horf zo deuet da vezañ nebutoc'h kizidik ouzh an insulin (insulinharzusted). Er rakdiabet ez eo direizhet ar c'hempouez etre ar glukoz hag an insulin, hogen ned eo ket ar glukozwadvec'h uhel a-walc'h evit c'hoazh evit ma ve komzet a ziabet. Koulskoude, adalek ar stad-se ez eo ar rakdiabeteion en ardzh riskloù mezekniezhel, rak ur glukozwadusvec'h padek a c'hell gaouiñ ouzh ar galon hag ar gwazhied (*intolérance au glucose*).

prédiastole ◇ **prediastole** ◇ **rakdiastol** g. Entremez diouzhtu a-raok an diastol er c'halongor.

prédiastolique ◇ **prediastolic** ◇ **rakdiastolel** A-zivout pe a-zave rakdiastol ar galon.

prédigestion ◇ **predigestion** ◇ **rakkoazhañ** Teskad ar gwezhiadennoù war ar boued o tiaraogiñ ar c'hoaz-hañ : chaokat, enhalviñ, h.a.

prédisposition ◇ **predisposition** ◇ **1 raktuañ, raktued** g. -où **2 kenttuañ, kenttued** g. -où, **kenttuadur** g. -ioù 1 Tued ar bevedeg da zastum ur c'hleñved, da skouer ar gizidigezh ouzh ar poreadur, an darbennusted ouzh ur gwezher pore 2 Tuadur ganedigel pe arzeuat ar bevedeg da vezañ tizhet gant ur c'hleñved.

NOTENN : Ned eo ket splann atav ar c'hemm etre *raktuañ* ha *kenttuañ*. Gant ar rakger *rak-* emeur er par deznaouel ha gant ar rakger *kent-* er par darganel kentoc'h. A se e vo komzet eus *raktued hêrezhel* ar voalded hipokratek hag eus ur *c'henttuadur hilel* evit ur seurt kankr, hep ma erzerc'hfe bewech.

prednisolone ◇ **prednisolone** ◇ **prednisolon** g. Kediad diwar dezhidrogenadur an hidrokortizon, dezhañ ur gwerederezh glukokortikoidel hag enepfoel brasoc'h, hag ur gwerederezh mineralokortikoidel bihanoc'h. Heñvelster : deltahidrokortizon.

prednison ◇ **prednison** ◇ **prednison** g. Kediad diwar dezhidrogenadur ar c'hortizon, dezhañ ur gwerederezh glukokortikoidel hag enepfoel brasoc'h, hag ur gwerederezh mineralokortikoidel bihanoc'h. Heñvelster : deltakortizon.

prédinance ◇ ◇ **1 muiegezh** b. **2 trec'hded** b. **3 sourusted** b. 1 Pouezusted a-fet niver, kreñvder 2 doare un divoud dezhañ ar roll trec'h en un teskad 3 A-zivout un dra bennak o tont da gentañ, o kemer al lec'h kentañ.

-prédomin-

- *prédominant aux extrémités* muiiek er bleñchoù
- *sclérose, prédominant au niveau de la paroi alvéolaire* skleroz, muiiek e speurenn al logigoù
- *pigmentation, prédominant au niveau de régions découvertes* livegad, muiiek er parzhioù dizolo
- *quand prédominant les formes peu segmentées* pa vez muiiek ar furmoù nemeurhoskek
- *prédominant à la racine des membres* muiiek e gwrizienn an izili
- *prédominance d'un syndrome trec'hded* un azoniad
- *quelle que soit la fraction prédominante* pe seurtad bennak e ve ar rann vuiek
- *où dominant les symptômes dépressifs* ma vez muiiek an dedreiñ gouvidel
- *la prédominance de la contracture* muiiegezh an dargrezañ
- *prédominant chez les adultes du sexe masculin* o tizhout aliesoc'h ar c'houreved oadour
- *à prédominance cervicale* gant muiiegezh e par ar gouzoug
- *manifestations prédominant aux membres* erzerc'hadoù muiiek e par an izili
- *leucocytes augmentés en nombre avec prédominance des mononucléaires* leukokit usriñvek e gounid ar mononuklear
- *prédominance d'une maladie infectieuse* muiiegezh ur pore
- *œil prédominant en vision normale* lagad trec'h er sellout reol
- *coloration blanc grisâtre qui prédomine à la macula* livrezh gwenn arlouet sourus er vrizhenn
- *symptomatologie polymorphe, où dominant trois éléments* un azoniadur liesneuz, ouzh e ober teir elfenn sourus.

prééclampsie ◇ **preeclampsia** ◇ **rageklampsiezh** b. Stad a wadpistriegezh vec'hiegvezhel a-raok an eklampsiezh hag o naouiñ dre un droazhproteinegezh, gouliñvoù hag un uswask talmerel.

prééruptif ◇ **preeruptive** ◇ **1 rakdispuilh** aa. **2 raknodadel** aa. 1 O tiaraogiñ un dispuilh 2 A-zivout ur stad o tiaraogiñ sevel an dant.

préruption ◇ **preeruption** ◇ **1 rakdispuilh** g., **rakdispuilhez** g. **2 raknodadur** g. 1 Ar prantad a-raok an dispuilhad 2 Sevel an dant a c'hoarvez a dri lankad : raknodadur, nodadur, diannodadur.

préexcitation ◇ **preexcitation** ◇ **rakvroudañ, rakvroud** g., **rakvroudadur** g. Broudadur un darn pe an holl eus ur gavenn galon o c'hoarvezout abretoc'h eget mar bije treledet al lanv tredanel dre ar rehennoù reol hepken. Ar rakvroudadur a c'hell bezañ trareat hag angorzhañ ar c'hofigoù, pe kizreat hag angorzhañ ar c'hentezioù (sl. *Wolff-Parkinson-White : syndrome de ~*).

préfrontal ◇ **prefrontal** ◇ **raogtalel** aa. A-zivout parzh arak an dolbezenn dal.

préganglionnaire ◇ **preganglionic** ◇ **rakgangrennel** aa. Savlec'h nezek e-keñver ur gangrenn, evit a sell nervwiennoù.

prégénital ◇ **pregenital** ◇ **rakganadel** aa. 1 A-raok peurziorreadur an organoù genel 2 Er bredelfennerezh, a-geñver gant prantad an diorreadur bredrevel ma n'eo ket diazezet c'hoazh hol an tachad ganadel.

prégnandiol ◇ **pregnandiol** ◇ **pregnandiol** g. Sterol deveret eus ar progesteron, ezvennet en troazh e rezh glikurokeveiled, a gementadoù boc'hedel gant ar gourev, brasoc'h gant ar venev el lankad luteel hag e-doug ar vec'hiegi.

prégnandiurie ◇ **pregnandiuria** ◇ **pregnandioldroazhvec'h** g. Bezañs pregnandiol en troazh.

prégnane ◇ **pregnane** ◇ **pregnan** g. Hidrokarbidenn beurvec'h (alkan lieskorvell) a zo deveret diouto ar progesteron hag an hormonou dezho ur gwerederezh glukokortikoidel ha mineralokortikoidel.

prégnanone ◇ **pregnanone** ◇ **pregnanolon** g. Kennevidad tetrahydrogenet eus ar progesteron.

prégnène ◇ **pregnene** ◇ **pregnen** g. Steroid strinkennek amvec'h dezhañ un ere daouel ha tri stroll metil. Amparañ a ra kraoñell ar progesteron.

prégninoline ◇ **pregneninoline** ◇ **pregneninolon** g. Kediad kevanaozel dezhañ perzhioù prostestogen, estrogen ha androgen zoken kediad kevanaozel.

prégnénone ◇ **pregnenolone** ◇ **pregnenolon** g. Steroid etreat e bevenaoz lies hormon.

préhallux ◇ **prehallux** ◇ **advulzuneg** g. Askorn dreistniver an troad a zo a-wechoù ereet ouzh torosenn ar bulzuneg dre ur strivrigorn pe ur gwiskad migorn gwerek (kenvigornad) (sl. *syndrome de l'os naviculaire accessoire*).

préhenseur ◇ **prehensile** ◇ **˘gavaelañ, gavaeler** aa. A-zivout un organ amkanet d'ar gavaelañ.

préhension ◇ **prehension** ◇ **gavaelañ** Tapout un dra bennak, gant an dorn dreist holl.

préhypophyse ◇ **prehypophysis** ◇ **rakgougorfenn** b. Tolbezenn araoak ar c'hougorfenn.

préjudice ◇ **prejudice** ◇ **gaouadenn** b. Hollad dianlenadoù ur gaouad korf a-fet saviad armerzhel, bredel, micherel ha personel un hinienn. Kemm a lakaer etre ar c'haouadenn c'hldel (o c'hoarvezout eus ar mizoù mezekniezhel hag apotikerezhel, ar c'holloù korvoder devoudet gant un dic'houested amzeriat hag un divarregezh) hag ur c'haouadenn amc'hldel a-zave d'ar gouzañvderioù korfel ha dezevel, enno ar gaouadennoù gwezeladel, bourrustedel, revel, h.a. (sl. *pretium doloris*).

prekallircéine ◇ **prekallikrein** ◇ **prekallikrein** g. Heñvelster : kallikreinogen (sl. *kallikréine*).

préleucémique ◇ **preleukemic** ◇ **rakleukemek** aa. A-raok ul leukemiezh.

prélèvement ◇ **sample** ◇ **1 erlemel (bn. erlam-), erlamadur** g., **erlamerezh** g. **2 erlamad** g. 1 Kemer, eztennañ un drailh gwriad, ur borc'had pe un degorzhad e sell d'an imboure'h neuzkleñvedel 2 An dafar dastumet e unan.

prématuré ◇ **premature** ◇ **1 rakkoulz** aa. **2 rakkoulzat** aa. **3 rakkoulzek** aa. **4 rakkoulzeg** g. **-eion** 1 A-zave d'un devoud kentrat, eleze o c'hoarvezout a-raok ar c'houlz reol. A se e vo komzet eus *soutadur rakkoulz ar mellezioù*, eus *argrezad rakkoulz a' r galon* en dreistsistol, eus *dehentadur rakkoulz, ezreol enta, a' r wagenn vroudañ*, h.a 2 A-zivout un arc'hwel o tennañ d'an den e e hinienn a-bezh, o c'hoarvezout kent an termen reol, evel da skouer ur c'hoshaat rakkoulzat, ur gwilioud rakkoulzat 3 A-zivout ur bugel ganet goude ur bec'hiegevezh dindan 37 sizhunvezh 4 bugel rakkoulzek.

prématurité ◇ **prematurity** ◇ **rakkoulzegezh** b. Stad ar bugel rakkoulzek.

prémédication ◇ **premedication, preanesthesia** ◇ **rakwezheriañ, rakwezheriadur** g., **rakdieraeziñ** Diounit liaoù a-raok un dieraeziñ, war-benn sioulaat ar gouziviad dre barraat ouzh enkreuz an oberata, kreñvaat gweredoù arverek an dieraezerioù ha kempouezañ dre se ar miweredoù, evel ar c'hweladurioù, an ushalviñ hag an damougoù nerval euverus.

préménopause ◇ **premenopause** ◇ **rageizkvan** b. **(venevel)** Prantad o padout un nebeut bloavezhioù a-raok an eizikvan venevel (ar paouez mizioù), o naouiñ dre rouesadur ar vic'hadiñ hag ul leiadur eus borc'hidigezh ar progesteron.

préménstruel ◇ **premenstrual** ◇ **rakviziaouel** aa. A-raok ar mizioù.

préménstruel : syndrome ~ ◇ **premenstrual syndrome** ◇ **azoniad** g. **rakviziaouel** Azoniat arsellet gant merc'hed 'zo e-doug ar prantad a-raok ar mizioù : naouiñ a ra ent klinikel dre ur c'hresk pouez heverk diwar un azdalc'h dourhalel reñverek, dre ur c'hoevadur laurus eus an divvronn, dre glopennadoù ha mirealoù : nervernegezh, enkreuz, darwantusted, fromidigezh, gouvid. En ardarzh anezhañ e tasperezh lies hormon : an estrogen, ar progesteron, ar prolaktin.

prémolaire ◇ **premolar** ◇ **rakvaler** g. **-ioù** Dant daouvroudek outañ 1 pe 2 wrizienn loet dirak ar malerioù. bez' ez eus 8 anezho, dezho ar roll da vreviñ ar boued (sl. *dent*).

prémonitoire ◇ **premonitory** ◇ **degemennus** aa. A-zivout arouezioù o tiaraogiñ a-wechoù nodadur ur pore darreuzius ha tredizhus, hag a c'hellfe, hennadet e koulz, kevaraezañ kemer an disentezioù ergurañ ret, da skouer *darc'hoal degemennus ar c'holera aziat*.

prémonitoire d'infarctus : syndrome ~ ◇ ◇ (sl. *état de mal angineux*).

prémuni ◇ **deharzet** aa., **deharzek** aa. Dezhañ deharz, ent naturel pe war-lerc'h ur vaksinadur deharzus, da skouer ar vaksinadur eneptorzhelliek gant ar BCG. Heñvel dra, diwar ar baludegezh ne vez ket hangae, met deharz ouzh poreadoù all.

prémunisation ◇ ◇ **deharzañ** Termen krouet gant Ch. Nicolle evit aroueziañ an harzusted ouzh an dorzhellegezh degaset gant ar vaksin BCG, nad eo ket ur vaksin hangaeus (rak an den vaksinet a c'hell bepred pakañ an dorzhellegezh, stourm gwelloc'h outi ne rafe ken), met ur vaksin deharzus.

prémunition ◇ ◇ **deharz** g. Termen oc'h aroueziañ ar stad a harzusted a-berzh ur bevedeg poreet ouzh an dreistporeañ gant hadennoù all, harzusted o paouez peurliesañ war un dro gant ar poreadur enkelat. An hangae, en eneb, zo an harzusted pad ouzh an adporeañ gant an un hadenn.

prémycosis ◇ **premycosis** ◇ **premikoziz** g. Stadoù dedreñ ar mikoziz fongoidel o tiaraogiñ dinodadur ar yoc'hennoù kroc'henn naouus.

prémycosique ◇ **premycotic** ◇ **premikozek** g. O tiaraogiñ ar mikoziz fongoidel.

prénatal ◇ **prenatal** ◇ **rakganedel** aa. A-raok ar c'hanedigezh, da skouer an *deznaou rakganedel* (sl. *diagnostic anténatal ou prénatal*).

prendre en charge ◇ **to manage** ◇ **1 ober war-dro** **2 ensammañ** **3 klevout ouzh, prederiañ, mezegañ, kurañ, yac'haat** **4 kemer e karg, kemer e bevadur** 1 Pledañ gant ur gouziviad, ur c'hlañavour, en un doare hollek 2 Sammañ atebegedh ur mezegadur, ur prederiadur, hir alies, er paroù kalvezel, bredel, kedvuhez, armerzhel 3 Emell un aroueler e sell da yac'haat ur gouziviad 4 Talañ ar mizoù evit unan bennak — anvet ar *bevadour* —, da skouer e *kemer ar c'hedskor e karg ar c'hleñved-mañ kleñved*, pe un *aozadur etrevroudel o kemer bugale e bevadur*.

Préobraschenski : syndrome de ~ ◇ **Beck's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Préobraschenski** Azoniad heskwad ar mel diwar dizhad (hogos bepred ateromatus) an talmerennoù magañ eus parzh araoak ar mel a-livenn, sezet er gouzoug, er c'hein pe en dargreiz. Naouus eo ent korfel dre anafoù steuñvenn louet ar c'herniel araoak, ar c'herniel kostezel ha diaz ar c'herniel adreñv, kevredet gant

anafoù ar steuñvenn wenn war an 3/4 diabarzh eus ar pañsoù kostezel; ent klinikel dre zoned feuls (diaraoget a-wechoù gant miloc'h pe mieraevioù hesteuz) un treuzseizi pe ur pevareseizi gwak a-ser gant un aneraez klok pe ur gwrezaneraez ha strafuilhoù kelc'hstrishaerel. Azoù e vez an dedro ar peurliesañ, ar seizioù oc'h argizañ e-doug un nebeut sizhunvezioù.

préœstrus ◇ **preoestrus** ◇ **rakdarvezh** g. Lankad follikulinel an dargor (sl. *cycle œstral*).

préparant ◇ **preparatory** ◇ **eraozus** aa. 1 E-kerz labour ar gwilioud e c'hoarvez gant an eskoradurez gwentloù eraozus el lankad frankadur gouzoug ar grozh 2 (sl. *anaphylaxie, injection préparante*).

préparation ◇ ◇ **1 prientiñ, danzen 2 angevezh** g. -ioù **3 darbar 4 eraozañ** 1 Termenoù hollek a dalvez lakaat un dra bennak en ur stad lavaret evit un arver, ur wezhiadenn o tont da heul 2 Lia, gwezher darbarec ar peurliesañ en apotikerezh. Kemm a lakaer etre *mestrangevezh, bonangevezh* (sl. an termenou-se) 3 Labour prientiñ e sell d'ur prederiadur, d'un imboure'h, da skouer *darbaradenn gelligouriezh, darbaradenn wiadoniezh* 4 Prientiñ ur gouziviad e sell d'un imboure'hadenn pe d'un oberatadenn. Da skouer e c'haller menegiñ an eraozañ d'ar gwilioudiñ, hentenn vrederaozañ dreist holl, anvet a-wechoù *gwilioudiñ dilaur*, kevredet gant kalvezderioù diseurt.

prépatence : **période de** ~ ◇ **prepatent period** ◇ **rakdiskelvezh** g. Mare eus un arvevadegezh o vont adalek an erialañ betek anadiñ an arvevaded gant ar gouziviad.

prépondérance ventriculaire ◇ **ventricular preponderance** ◇ **souridigezh** g. **kofigel** Stad ar galon o naouiñ, war ar c'halon-varrvezad, dre un dehou- pe gleizwariadur eeun a'n tredanahel; erzerc'haat a ra argemmadoù neuziadel glez eus loadur ar galon er bruska, pe un deroù usvent eus an daou gofig (sl. *prédominance*).

préprandial ◇ **preprandial** ◇ **rakpredel** A zarvez a-raok ar predoù.

préprohormone ◇ **preprohormone** ◇ **rakprohormon** g. Diaraoger prohormon.

presbyacousie ◇ **presbyacusia** ◇ **hirglev** g. Darallad ar c'hleved a c'haller arseliñ gant an henaded. Klevout a reont gwell a-bell eget a-dost ha gwell ivez ar vouezh kuzhuliket eget ar vouezh uhel, dre an arbenn moarvat ma'z eo diaesoc'h evit an organ gwanaet da argeidañ ha ma'z eo strafuilhet en e arc'hwel gant un tregren re greñv.

presbyophrénie ◇ **presbyophtenia** ◇ **presbiofreniezh** b. Psikoz arsellet gant an henaded, beneved dreist holl, o naouiñ dre enkrezioù, trezerc'hioù, mennozioù ambreek ha mennozioù heskinadur, koll ar c'hounañ hag an diaez da stiañ an evezh. Kevret ganti e vez alies liesnervennfoù (psikoz liesnervennfoel Korsakow). Rouez eo an dedro etrezek ar pare.

presbyopie ◇ **presbyopia** ◇ (sl. *presbytie*).

presbytie ◇ **presbyopia** ◇ **hirwel** g. Diaester da welout spis, hep skuizhnez, an ergorennoù nes, dezhañ da arbenn leiadur ampled an argeidañ gant ar gozhni. An nespoent (*punctum proximum*) a bella tamm ha tamm diouzh al lagad ha tennañ a ra da gejañ gant ar pellboent (*punctum remotum*).

prescription ◇ **prescription** ◇ **erskrivañ (-ad, -adur, -erezh)**; **ordren (-ad, -adur)**; **erverkañ (-ad, -adur)** Teskad an ergemennadoù yac'hadel graet (ar peurliesañ dre skrid : *ordrenañs*) gant ar mezeg d'e c'houziviad.

présellaire ◇ **presellar** ◇ **rak-dibr** aa., **rakdibrel** aa. Loet dirak an dibr turkek.

présénile ◇ **presenile** ◇ **rakkozhiael** aa. A-zave d'ar stadoù pe d'ar strafuilhoù a-raok ar gozhni.

présénilité ◇ **presenility** ◇ **rakkozhialegezh** b. Mare ma krog da erzerc'haat arouezioù koshaat 'zo, hep ma ve tu da gomz eus kozhiadegezh evit c'hoazh.

présénium ◇ **presenium** ◇ **rakkozhni** b. Mare an hoali a-raok ar gozhni.

présentation ◇ **presentation** ◇ **erload** g. Lodenn eus ar grouell o c'henniñ digor krec'h al lestr kent diskenn drezañ ha trehentiñ hervez ur wikefre dibarek. Keal an diskenn, ent resis an *enankañ*, zo diziouerus da savelañ an erload : pa vez kein ar grouell harpet ouzh an digor krec'h, ne vez erload ebet, dre na c'hell ket ar grouell diskenn ha trehentiñ dre al lestr. Hervez al lodenn oc'h enteiñ da gentañ e tiforc'her erload ar gitem , erload an tal, erload an dremm, erload ar revr, h.a. (sl. *dégagement, présentation*).

présentation des antigènes ◇ **antigen presentation** ◇ **erzodiñ an antigenoù** Arc'hwel molekuliou proteek a 'r reizhiad HLA. – Ar re eus ar c'hlas I a ged ouzh an antigenoù a orin endeuat ar peurliesañ (peptidoù kitozolek), a-wechoù a orin ezdeuat. Ar c'hengediad antigen-molekul HLA zo dezoget betek al limfokitoù kelligpistrius T-CD 8 (pe TK) ha nauaet ganto. Arwerc'het eo neuze an antigenoù gant al limfokitoù-se. Kiriek eo ar molekuliou HLA-se eus ar c'hlas I da zistaal an unspesadimboudoù goude un treuzplantadur organ. – Ar molekuliou eus ar c'hlas II a erzod antigenoù a orin ezdeuat (peptidoù bakteriel, toksinoù), entoet dre endokitoz pe fagokitoz e-barzh al limfokitoù harper T-CD 4. An argerzh hangaeel-se a gendaol d'an distaal eus an allev ha da zifenn ar bevedeg enep ar gwezherioù pore.

présentation du bregma ◇ **bregma presentation** ◇ **erload ar bregma** Seurtad erload an tal, a zo feunteunig ar bregma en e greiz.

présentation céphalique ◇ **cephalic presentation** ◇ **erload ar penn** An erload patañ a-galz (90 %), ar grouell oc'h enteiñ dre ar penn en digor krec'h. Ar penn a c'hell bezañ pleget (erload ar gitem) pe dibleget (erload an dremm) pe etre an daou (erload an tal).

présentation de l'épaule ◇ **shoulder presentation** ◇ **erload ar skoaz** Plegenn anreol pa na vez gannet an digor krec'h, e dibenn ar vec'hiegi pe e-doug ar gwentloù, na gant penn, na gant revr ar grouell, houmañ o vevañ durc'haet, n'eo ket a-hed, met

a-dreuz pe a-veskell. Ar c'herienn *erload ar skoaz* zo arzaeladus, pa na vez ket ar skoaz bepred a-geñver gant an digor krec'h en deroù, hag ivez pa nad eo ket un "erload" er ster strizh dre ma ne c'hell ket ar grouell trehentiñ dre al lestr.

présentation de l'épaule négligée ◇ **neglected shoulder presentation** ◇ **erload ar skoaz gwalleget** Gerienn oc'h aroueziñ ur blegenn gemplezh dezverket gant an amveziadoù-mañ : a) deraouet ar gwentloù, digoret ar vi, dargrezet ar grozh, b) aet diloc'h an erload, c) poreet ar vi, d) marvet ar bugel, e) aet dic'hallus pe da nebeutañ dañjerus an amc'hwel. Kentoc'h eget "gwalleget", pezh a lakafe an darvoud e kiriegezh ar mezeg, e ve gwel ober gant "andeznaouet".

présentation de la face ◇ **face presentation** ◇ **erload ar rakpenn, erload an dremm** Erload ar penn, dibleget, hevelep ma teu er-maez da gentañ an dremm en he fezh, gant an elgezh. Meur a seurtad zo dezhañ hervez ma emañ an elgezh a-dreñv pe a-raok, a-gleiz, a-zehou pe a-gostez : *erload elgezh dehou a-dreñv, a-raok, a-dreuz* (E.D.V., E.D.K., E.D.Z.), Gl. *présentation mento-iliaque droite postérieure, antérieure, transverse* (M.I.D.P., M.I.D.A., M.I.D.T.), h.a.

présentation du front ◇ **brow presentation** ◇ **erload an tal** Erload eizhaenn grec'h ar grouell en un durc'hadur etre, eleze na pleget evel erload ar gitern, na dibleget evel erload ar rakpenn. Mieskorek kenan eo erload an tal, rak penn ar grouell en em gav ouzh an digor krec'h hervez e drezkizoù brasañ (kilpenn-elgez pe kilpenn-fri). Diouzh an durc'hadur e tiforc'her meur a seurtad : *erload fri-klun dehou a-dreñv, a-raok, a-dreuz* (F.D.V., F.D.K., F.D.Z.) Gl. *présentation naso-iliaque droite postérieure, antérieure, transverse* (N.I.D.F., N.I.D.A., N.I.D.T.), h.a.

présentation du front négligé ◇ **neglected brow presentation** ◇ **erload an tal gwalleget** Enbac'h tal ar grouell e lestr ar vamm pa nad eo ket bet deznaouet un erload a'n tal — marv ar bugel o tont da heul hogos bepred.

présentation du siège ◇ **pelvic presentation** ◇ **erload ar revr**

An erload kroazell-klun dehou pe gleiz a-dreuz zo durc'hadur ec'hankañ erload ar revr.

A-wechoù e komzer ivez a *erload ar revr damziglok* Gl. *présentation du siège incomplètement décompleté* pa na vez ket peurastennet izili traoñ ar grouell. Erload eizhaenn draoñ ar grouell. Dibaot a-walc'h, e c'hoarvez gant ar gentaganerez da heul ur gammneuziad leiek eus ar grozh, hag andireadus eo neuze. Gant al liesganerez, e teu diwar istant ar grozh ha direct e c'hell bezañ dre gefleñvadou diavaez. Daou zoare erloadoù ar revr a ziforc'her : erload ar revr klok (gl. *présentation du siège complet*) pa vez pleget izili traoñ ar bugel, hag erload ar revr diglok (gl. *présentation du siège décompleté*) pa vez izili traoñ ar grouell astennet a-hed tal araok he c'hef. deskrivañ a reer lies seurtad da erload ar revr : *erload kroazell-klun dehou a-raok, a-dreñv, a-dreuz* (K.D.K., K.D.V., K.D.Z.) Gl. *présentation sacro-iliaque droite antérieure, postérieure, transverse* (S.I.D.A., S.I.D.P., S.I.D.T.), h.a.

An erload kroazell-klun dehou pe gleiz a-dreuz zo durc'hadur ec'hankañ erload ar revr.

A-wechoù e komzer ivez a *erload ar revr damziglok* Gl. *présentation du siège incomplètement décompleté* pa na vez ket peuras-tennet izili traoñ ar grouell.

présentation du sommet ◇ **vertex presentation** ◇ **erload ar gitern, erload ar c'hloppenn**

An erload kilpenn kreiz a-raok zo durc'hadur ec'hankañ gwellek an erloadoù a 'r gitern. Da vonan e tarbenner c'hweladenn ar penn war ziaraok evel deroù an ec'hankañ, zoken evit an erloadoù a-dreñv.

An erload kilpenn kreiz a-dreñv a c'hoarvez goude un enankañ kilpenn kleiz a-dreñv pa vez re dev ar grouell gant al liesganerez hag e tro gwilioudiñ an eil gevell ; seurt c'hweladenn war ziadreñv a vez alies e devoud rogadoù ar c'harbedenn. Erload penn pleget ar grouell, ar c'hloppenn o c'houzalc'h digor krec'h al lestr, ar c'hilpenn o talvout da zesteud da savelañ ar seurtad. An erload paotañ, aesañ d'ar gwilioud, sellet evel ar reolañ. Ar seurtadoù anezhañ zo : *erload kilpenn dehou a-raok, a-dreñv, a-dreuz ; erload kilpenn kreiz a-raok, a-dreñv* (N.D.K., N.D.V., N.D.Z., N.Z.V.), Gl. *présentation occipito-iliaque droite antérieure, postérieure, transverse ; présentation occipito-pubienne, occipito-sacrée* (O.I.D.A., O.I.D.P., O.I.D.T. ; O.P., O.S.), h.a.

An erload kilpenn kreiz a-raok zo durc'hadur ec'hankañ gwellek an erloadoù a 'r gitern. Da vonan e tarbenner c'hweladenn ar penn war ziaraok evel deroù an ec'hankañ, zoken evit an erloadoù a-dreñv.

An erload kilpenn kreiz a-dreñv a c'hoarvez goude un enankañ kilpenn kleiz a-dreñv pa vez re dev ar grouell gant al liesganerez hag e tro gwilioudiñ an eil gevell ; seurt c'hweladenn war ziadreñv a vez alies e devoud rogadoù ar c'harbedenn.

présentation : repère de ~ ◇ **presenting part** ◇ **desteud g. an erload** Poent dibabet war erload ar grouell a savlec'hier e-keñver lestr ar vamm evit despizañ ar seurtadoù erload.

présérologique : période ~ (ur c'hleñved) ◇ **before seroconversion** ◇ **rakwadveizyaekvezh g.** A-raok yaekadur an erwezhioù gwadveizel.

préservatif ◇ **contraceptive device, condom** ◇ **stevell b. -où** Gronnenn e lateks bouk ha dastennek arloet war ar c'halc'h da-geñver ur geventrac'h gant un amkan hilastaliñ ha gwardiñ diouzh ar c'hleñvedoù revdredizhus.

présomptives : réactions ~de la syphilis ◇ **presumptive tests of syphilis** ◇ **erwezhioù ersoliadel ar sifiliz** Erwezhioù gwadveizel ar sifiliz dewerc'het gant antigenoù uhel kenan o c'hizidigezh, dizingal o derez spesadelezh avat. N'eus nemet an erwezhioù nac'hek a zo talvoudus.

présomption ◇ **presomption** ◇ **ersoliañ, ersol g.** Meno soliet war anadoù ha n'eo ket war ur peurasurder. Da skouer, yaegezh an dazgweredoù Gaté-Papacostas, Weichbrodt hag ar benzo kolloidel a ro un ersol deznaou a dripanozomiaz.

présphygmique ◇ **presphygmic** ◇ **rakpoulzadel aa.** A-zivout ul lankad eus ar sistol kofigel ma krog ar c'hofig da argrezañ hep erluskañ ar gwad talmerel evit c'hoazh. Komz a reer eus *lankad rakpoulzadel pe rakpoulzvezh* ar sistol kofigel.

pression¹ ◇ pressure ◇ pouezañ Mod leuñviñ o c'hoarvezout eus stekiñ, gant an dorn pe ur biz, en un doare kreñv pe greñvoc'h hag arreet war ur parzh a 'r c'horf.

pression² ◇ pressure ◇ gwask g. Nerzh o werediñ war an unanenn c'horread : $P = F/S$.

pression artérielle ◇ blood pressure, arterial pressure ◇ gwask talmerel Gwask ar gwad war speurioù an talmerennoù trobarzhel, a luskell dizehan etre ur werzh uc'hek o klotañ gant ar sistol (gwask sistolel, gwask uc'hek) hag ur werzh izek o klotañ gant an diastol (gwask diastolel pe gwask izek). Dewerzhañ a reer ar gwask talmerel diwar-bouez ur talmerwaskventer pe un oskillometr.

pression artérielle ophtalmique ou pression artérielle rétinienne ◇ ophtalmic artery pressure ◇ gwask talmerel luc'hsaeel Gwask ar gwad e talmerennoù al luc'hsae.

pression capillaire pulmonaire ◇ pulmonary capillary pressure; pulmonary artery wedge pressure ◇ gwask korrdalmerel skeventel Gwask muzuliet e-ser kateteriñ kavennoù dehou ar galon ha talmerenn ar skevent, pa vez gennet beg ar sont en un dalmerennig skevent. Par eo ar gwask-se da hini gwazhied ar skevent ha da hini ar c'hentez kleiz. Ar gwask korrdalmerel keitad zo 5 mmHg. Ent ezreol, ar G.K.S. a vez uhel er c'halonnaouedoù kleiz (isvöll mintrek, diaez an diflistrañ pe skorted ar c'hofrig kleiz) hag er c'halonnaouedoù ganedigel gant ur skoef kleiz-dehou uhelgas ha gant harzoù skeventel reol.

pression intraoculaire ◇ intraocular tension or pressure ◇ gwask enboulel pe enboulwask Gwask o ren er voull lagad o kevaraezañ tant ar speurioù anezhi. Devoudet eo dre vezañs dourenn al lagad er c'hambrou arak hag adreñv ar voull lagad. E vuzuliañ a reer diwar-bouez un tonometr : ar gwask bonan zo gavaelet etre 10 hag 20 mmHg hag uhel e vez gant ar glaokom.

pression oncotique ◇ oncotic pressure ◇ gwask g. onkotek, grenn g. kolloidel (sl. *oncotique : pression* ~).

pression osmotique ◇ osmotic pressure ◇ gwask g. treleizhiñ, grenn g. (sl. *osmose hag osmotique : pression* ~).

pression partielle d'un gaz ◇ partial tension (pressure) of a gaz ◇ gwask darnel un aezhenn Darn ar gwask hollel diorreet gant an aezhenn-se er meskad aezhel pe liñvel : $Gd = Gh \times \%$ ($Gd =$ gwask darnel, $Gh =$ gwask hollel, $\%$ feur an aezhenn desellet er meskad, eleze he rann volel). Er c'hempouez, gwask darnel an aezhenn en arvez liñvel zo par d'ar gwask darnel anezhi en arvez aezhel. Bec'h an aezhenn ar meskad liñvel a jeder dre an daveadur : $B = D \times Gd$ gant $B =$ bec'h an aezhenn, $D =$ dileizhusted an aezhenn ha $Gd =$ gwask darnel an aezhenn.

pression veineuse ◇ veinous pressure ◇ gwask gwazhiennel Gwask ar gwad er gwazhiennoù. — ar gwask gwazhiennel trobarzhel muzuliet dre ezwanañ ur wazhienn eus pleg ilin ar gouzrec'h gourvezet a vez gavaelet ent reol etre 3 ha 12 cm dour. — Ar gwask gwazhiennel kreiz zo an hini, muzuliet dre gateteriñ, a vez o ren er c'hentez dehou hag er gwazhiennoù kav e-kefin an difourkoù anezho.

pressorécepteur ◇ pressoreceptor ◇ gwaskfraouva g. (sl. *barorécepteur*).

pressothérapie ◇ pressure therapy ◇ gwaskkurañ (sl. *barothérapie*).

prestations familiales ◇ gouzeuladoù familhel Sammadoù arc'hant talet gant ar ar c'hefioù goprou tiegezh amkanet da skozellañ an tiegezhioù evit o dispignoù (sl. *organisme social*).

présure ◇ rennet ◇ goedenn b. Danvezenn eztennet eus pevare stomok (ar gaouledenn) al leue hag an daskiriered yaouank, maget gant laezh hepken : puilh enni al labgoell, gantañ ar perzh da gaoulediñ al laezh.

présynaptique ◇ presynaptic ◇ raksinapsel A zo loet en argrec'h d'ur sinaps.

présystole ◇ presystole ◇ raksistol g. Lankad diouzhtu a-raok ar sistol kofigel.

présystolique ◇ presystolic ◇ raksistol aa., raksistolel A-zave d'ar raksistol.

pretium doloris ◇ pretium doloris Andalad ar gouzañverioù devoudet gant un darvoud, a dalvez da zic'haouiñ ar reuzied.

prévalence ◇ prevalence ◇ revezusted b. “niver an degouezhioù kleñved pe niver ar glañvourion, pe hini nep reuzenn all evel un darvoud o revout en ur boblañs savelet, hep diforc'h ebet etre an degouezhioù nevez hag ar re gozh” (despizadur Aozadur Bed ar Yec'hed). An ditourenn-se (gwerzh dizave pe kenfeur) a vez arveret paot er reuziadoniezh hag ar stadegouriezh yec'hedel.

préventif ◇ preventive ◇ 1 a) ~ergurañ ; b) ~dizarbenn 2 a) erguradel aa. ; b) dizarbennus aa. 3 ergurer g. -ioù 1 a) E sell d'an ergurañ, da skouer *ul lia ergurañ, mezegadoù ergurañ evel ar vaksinoù*; b) e sell da zizarbenn un darvoud yec'hedel bennak 2 a) A-zave d'an ergurañ, da skouer *ur vezekniezh erguradel, un amkan erguradel, ur wezhiadenn erguradel*; b) en araez da zizarbenn 3 Lia ergurañ, danvezenn ergurañ, evel an etanol arveret evel ergurer an delirium (sl. *prophylactique*).

prévention ◇ prevention ◇ 1 ergurañ 2 dizarbenn 1 Teskad an araezioù mezegel ha gwardvezegel engwezhet evit parraat ouzh ar c'hleñvedoù (ergurañ kentael), ouzh ar grevusadur anezho (ergurañ eilvedel), pe evit kevaraezañ adkenempradur kevredigezhel ar glañvourion en ur gedvuhez nes d'ar reolded (ergurañ tredeel) 2 Gwezh embreget evit hepkoriñ un darvoud o tennañ d'ar yec'hed.

NOTENN : Emañ arver pep hini eus an daou dermen hervez an dro : ledanoc'h eo erdal *dizarbenn* eget hini *ergurañ*. An termen kentañ a ve da verañ kentoc'h pa vez anv a hepkoriñ un darvoud yec'hedel hag an eil pa rekourer da araezioù mezegel. Da skouer : *dizarbenn ar vrazezded, dizarbenn distaal an organoù treuzplantet, dizarbenn ur poread klinikel* hag a hent all *arver al litium da ergurañ pe da gurañ ar mania, arver erguradel ar gwadveizoù, ergurañ ur c'hleñved dre ar vaksinerezh, mezegadoù ergurañ evel ar vaksinoù*. A se despizadur ar *vezekniezh ergurañ* : studi hag arloañ an araezioù o parraat ouzh ar c'hleñvedoù.

Nes a-walc'h eo *ergurañ* d'an damheñvelster da *prévention* a zo *prophylaxie* (sl. *séroprophylaxie*, Br. *gwadvezigurañ*). Notañ ivez arver *disgwallañ* gant kemeradurioù nes da re *dizarbenn*.

-prévent-

• *prévenir la grossesse* dizarbenn ar vrazedzed • *dans la prévention du delirium* evit dizarbenn an deliriom • *prévention du rejet des organes transplantés* dizarbenn distaol an organoù treuzplantet • *au stade de la prévention, du traitement curatif ou de la contention* e pazenn an ergurañ, ar c'hurañ pe an enderc'hel • *utilisation dans un but préventif* arver erguradel • *utilisé pour les traitements préventifs* diounezet evit an ergurañ • *chimioprévention* kimiergurañ kentael • *précautions préventives* diarbennoù ergurañ.

préventorium ◇ **preventorium** ◇ **ergurva** g., **preventorium** g. Herberc'hti evit bugale pe grennarded kentporet gant an dorzhellegezh.

prévétébral ◇ **prevertebral** ◇ **rakvellennel** aa., **rakvellkeinel** aa. Loet dirak ur vellenn pe dirak ar mellkein.

prévésical ◇ **prevesical** ◇ **rak-c'hwezhihell**, **rak'hwezhihell** aa. Loet dirak ar c'hwezhihell.

Prévost : **signe de ~** ◇ **Prevost's sign** ◇ **arouez** g. **Prévost** En un anaf empennel kostezel e tro ar penn ouzh tu an anaf.

prézone : **phénomène de prézone** ou **phénomène de prozone** ◇ **prezone phenomenon**, **antibody excess** ◇ **anadenn b. ar reñver antikorfoù** En amveziadoù gwellek, furmidigezh ar c'hemplezhioù antigen-antikorf a c'hoarvez pa vez mui pe vui hegement an hanloadoù antigen hag ar molekul antikorf. Merzhadus kenan eo neuze an dazglugadoù. War an derc'hennadur kevregat *niver ar c'hemplezhioù antigen-antikorf merzhadus a-gevreizh da vec'h an antigen* e reer anv eus an *tachad kevatalded*. Mar bez reñverek an antikorfoù ez eo ar c'hemplezhioù diheverzh pe diverzhadus, rak kevezerezh zo etre an antikorfoù evit lenañ ouzh an hanloadoù antigen hegerz; peurvec'hiadur an hanloadoù a skoilh an dazgwered dazgludañ (sl. *phénomène de postzone*, *phénomène de zone*).

priapique ◇ **priapic** ◇ **1 priapek** aa., **dirgalc'hek** aa. **2 dirgalc'hel** aa. **3 dirgalc'hég** g. **-eion** 1 Gant an dirgalc'h 2 A-zave d'an dirgalc'h gouziviad tizhet gant an dirgalc'h.

priapisme ◇ **priapism** ◇ **priapegezh** b., **dirgalc'h** g. Sonnañ revel reñverek, hirbad ha laurus, e-maez nep plegenn orgedel. Arsellet e vez an dirgalc'h dreist holl gant kantroazhfoioù pe c'hwezhihellfoioù 'zo, gant anafoù 'zo a r' mel a-livenn hag e-doug gwadnaouedoù hag ensinkladurioù enkeviaouek.

NOTENN : un anaez nes d'ar briapegezh eo ar *glitoregezh* (gl. *clitorisme*), daoust ma ne vez ket arveret paot an eil termen. E-kichen an termenoù etrevroadel e c'haller luniañ termenoù du-mañ diwar ur verb o verkañ ar sonnañ eus an organoù revel — *kevodiñ* — ha kinnig Br. *dirgevod* da aroueziñ an anadenn gleñvedel boutin etre an div rev. A se *dirgevod an ellig* → *direllig* hag ivez *dirgevod ar c'halc'h* → *dirgalc'h*.

Price-Jones : **courbe de ~** ◇ **Price-Jones curve** ◇ **krommenn b. Price-Jones** Krommenn savet o tougen war ahel al ledennoù treuzkiz an hemati ha war ahel an heddennoù niver an hemati evit pep treuzkiz. Tresañ a reer evel-se ur grommenn war gloc'h. Ledanadur ha platadur ar grommenn-se zo andaladur an ankeitkellig.

Prick test ◇ **Prick test** ◇ **proud** g. **Prick** Proud evit dinoiñ un dreistkizidigezh kentizhek; embreget dre flemmañ an ezkroc'h en a-dreuz un dakenn a zileizhenn allergen.

prière mahométane : **signe de la ~** ◇ **mahometan prayer sign** ◇ **arouez ar bedenn vahomedat** Emlakadur daoulin-brennid kemeret gant ar glañvourion tizhet gant an amgalonennfo gant fennadur, evit skañvaat o zrec'hwezh (sl. *genu-pectorale* : *position* ~).

primaire ◇ **primary** ◇ **kentael** aa. Er gleñvedouriezh, termen arveret evit doareañ an arbennoù, an azonoù, an anafoù a nad ar re gentañ e-keñver reoù all a lavarer neuze eilvedel, tredeel, h.a.

primigeste ◇ **primigravida** ◇ **1 kentabec'h** aa. **2 kentabec'hiegezh** b. **-ed** 1 A-zivout ur vaouez dougerez evit ar wech kentañ Maouez kentabec'h.

primipare ◇ **primipara** ◇ **1 kentaganerez** aa. **2 kentaganerez** b. **-ed** 1 A-zivout ur vaouez o wilioudiñ evit ar wech kentañ 2 Maouez kentaganerez.

primiparité ◇ **primiparity** ◇ **kentagenel pao.**, **kentaganeriezh** b. Stad ur vaouez kentaganerez.

primitif ◇ **primitive** ◇ **1 kentael** aa. **2 hennadek** aa. **3 kezivik** aa.; **arc'h-** 1 A-zivout un anaf, un anadenn oc'h erzerc'hañ da gentañ hag a zo en orin reoù all o tont da heul (sl. *primaire*). 2 A-zivout un anaez n'eur ket deuet a-benn c'hoazh da zizoleiñ an natur pe an arbenn anezhañ (sl. *idiopathique, essentiel*). 3 Er stad rizhellel, a-zivout un organ, ur parzh eus un organ, kelligoù....

primo-infection ◇ **primary infection** ◇ **kentporead** g. Poread kentañ ar bevedeg gant garvevion. Ar peurliesañ e ra dave an termen-se d'ar c'hentporead torzhellek.

primovaccination ◇ **first vaccination** ◇ **kentavaksinañ** g. Kentañ diounezadur vaksin.

prim-

• *quand le regard s'éloigne de la position primaire* pa bella ar sell diouzh ar savlec'h kentael • *syndrome primitif (ou primaire)* ou *secondaire* azoniañ kentael pe eilvedel • *primo-infection* kentporead • *atteint de primo-infection* kentporet • *tumeur primitive* yoc'henn gentael • *cirrhose biliaire primitive* kirroz bestlel kentael • *la fonction carbamate primaire* ar soaz karbamat kentael • *pneumonie primitive* skeventfo kentael • *segment médullaire primitif* hanrann velel kezivik • *intestin primitif, archantéron*

arc'hpervéz • *tube cardiaque primitif* kanol arc'hkalon • *feuillelet primitif* feilhenn gezivik • *siège primitif et métastases* kentsez (pennsez) ha dassezioù.

principe ◇ **principle** ◇ **1 pennaenn b. 2 pennaenn b., gwezhuzeñ b., gwezher g. ioù** 1 Erganed diazez un argerzh, un diskiblezh, un dezrann, un dezreadur 2 Kediad kimiiek dezhañ perzhioù savelek, douhennet eus danvezennoù struzhel pe loenel.

princ-

• *principes actifs de drogues végétales* gwezhuzeñnoù diwar drammoù struzhel • *alors qu'en principe les sarcomes ne donnent pas de métastases ganglionnaires* tra na vez ket ent derc'hek dassezioù gwerblennel gant ar sarkomoù • *voie biliaire principale* pennforzh vestl • *cellule principale* kellig pennañ, pennellig • *principe de la contractibilité* pennaenn an argrezusted • *principe de plaisir* pennaenn ar bliz • *principe de réalité* pennaenn an dra.

Pringle : **maladie de ~** ◇ **Pringle's disease** ◇ **kleñved Pringle** Adenomoù blevsoavel kemparzhek an dremm.

PRINS ◇ **primed in situ labeling** ◇ **tiellañ in situ kantboulc'h (TISKA)** Kemaladoù oligonukleotid berr a vez arveret evel boulc'hoù an dazgwered. Goude bezañ bet koublet in situ ouzh o c'hemaladoù genomel klokaus e c'hellont talvezout da boent loc'hañ un dazgwered hiraat trelusket gant an Taq DNA polimeraz, a-ziavesk nukleotidoù digraf. An tammad hiraat a hewelaer dre ensoc'hañ un nukleotid tiellet. Ar c'halvezder TISKA zo un araez azas kenan ouzh elfennerezh in situ ar c'hromozomoù.

Prinzmetal : **syndrome de ~** ◇ **Prinzmetal's angina** ◇ **azoniad Prinzmetal** Seurtad kevenkez kalon e rezh barradoù laurioù grizias (sl. *angor de Prinzmetal*).

prion ◇ **prion** ◇ **prion g.** Rannig proteek poreüs treuzkasadus, unanazeiladus, enni na DNA na RNA. Ar prionoù zo gwezherioù kiriek d'an empennaouedoù spouevanek (krenion an deñved, empennaoued spouevanek ar bioù, ha gant an denion kleñved Creutzfeldt-Jakob hag an anhun feudek familhel).

prismes de l'émail ◇ **adamantine prisms** ◇ **kengeregoù an amailh pe pañsou an amailh** Luniadoù elfennel kengerek oc'h amparañ an amailh.

pristinamycine ◇ **pristinamycin** ◇ **pristinamikin g.** Bevastaler eus kevrennad ar streptogramineer gweredus war lies hadenn, ent dibarek ar stafilokok.

priv-

• *privation sexuelle* dienez revel • *calciprivate* olrazus, kalkiomisvec'huis; olrazien, kalkiomisvec'hien; olrazel, kalkiomisvec'hel • *anémie ferriprive* amwad diwar olhouarn, amwad olhouarnel • *privation de toute vision* ezvezañs klok ar gweled • *plans privilégiés* talennoù brientek • *hypophysoprivate* olgougorfennel • *strumiprivate* olskoedennel • *pancréatoprivate* olilgreizel.

proaccéléline ◇ **proaccelerin** ◇ **proakelerin g.** Paren V ar c'haouediñ o vuanaat treuzfurmadur ar protrombin e trombin.

pro-alvéolie ◇ **labioversion** ◇ **raklogigegezh b.** Kammneuziad o c'hoarvezout eus ur stouadur anreol war raok logigoù ar rakdent, a c'hell bezañ krec'h, traoñ pe daouek.

pro-antigène ◇ **proantigen** ◇ **proantigen g.** Danvezenn izel he zolz mol a c'hell monediñ evel un antigen goude lenañ war ur protein eus ar gouzrec'h ebarzhet ennañ an kez danvezenn.

proatlas ◇ **proatlas** ◇ **mellenn b. rak-marc'h** Mellenn gilpenn diwezhañ diorreet er mezenkim etre ar vellenn varc'h hag ar c'hilpenn; ent reol e steuz evit darn gant an den dre ensoc'hañ er c'hilpenn.

proband ◇ **proband, propositus** ◇ **ditourer g. hilel pe hilditourer pe gouziviad g. alf pe alfad g. -ed** Kentañ degouezh hennadet ur c'hleñved hilel en un tiegezh, alf un imbourc'h tiegezhel.

probenécide ◇ **probenecid** ◇ **probenekid g.** Deverad an drenkenn venzoek a skoilh ouzh dezougerezh tuellennel an trenkennoù bevel. Arveret e vez e mezegadur an urekwadusvec'h, hag evit kaout penikillinwadvec'hioù plasmatek uheloc'h ha stabiloc'h, pa zale degorzhañ tuellennel an kez bevastaler.

probiotique ◇ **probiotic** ◇ **probiotek aa. ; probioteg g. -eier** (sl. *prébiotique*).

procaïnamide ◇ **procaïnamide** ◇ **prokainamid g.** Keveler ar prokain, ma 'z eo bet erlec'hiet ur bonad amid ouzh an ere ester. Arveret e vez e prederiadur migorveziou 'zo.

procaïne ◇ **procaine** ◇ **prokain g.** Dieraezer lec'hiek, nebeutoc'h pistriek eget ar c'hokain ha hep ar gwered gwazhiedstrishaat anezhañ.

procarbazine ◇ **procarbazine** ◇ **prokarbazin g.** Enepkankreg arveret e prederiadur kleñved Hodgkin, ar retikulosarkomoù hag al limfosarkomoù.

procaryote ◇ **1 prokaryotic 2 prokaryote** ◇ **1 prokariot aa. 2 prokariot g.** 1 A-zivout ar bevion unkellig dezho ur graoñell hep koc'henn, gant ur c'hromozom hepken, evel ar bakteri hag ar felu glas. 2 Bev prokariot.

procédé ◇ **procedure** ◇ **araezad g., kalvezad g., argerzhad g.** Er surjianerezh ez eus kel a *araezad oberatael*, eleze un hentenn, un argerzhad arveret evit erroun un pe lies gwezhiadenn pe evit dewerc'hañ ur c'halvezad surjaniel dibarek. Un oberatadenn lavaret a c'hell bezañ kaset da benn dre zaou pe lies araezad disheñvel.

procéd-

• *procédé thérapeutique* araezad yac'hadel • *procédé de destruction des vaisseaux* araezad distruj ar gwazhied • *les quatre procédés de l'examen clinique* pevar araezad an imbourc'h klinikel • *procédé d'étude et de représentation* araezad studiañ ha derc'hennañ

• *procédé chirurgical* araezad surjaniel • *procédant de la méthode* o tinaouiñ eus an hentenn • *procédé destiné à améliorer* araezad amkanet da wellaat • *procédé visant à stériliser* araezad evit dishadennañ • *selon le procédé* hervez an araezad.

processus ◇ **process** ◇ **1 askouezh g., baleg g. 2 argerzh g. -ioù** 1 Er gorfadurezh, furmadur oc'h amparañ astennad un organ, ul luniad pe un askorn 2 Heuliad anadennoù, anafoù, azonoù, h.a..

proces-

• *processus physiologique, pathologique* argerzh bonan, kleñvedel • *processus métaboliques* argerzhioù kennevidel • *processus morphogénétiques* argerzhioù stummdarzh • *processus tumoral* argerzh yoc'hennel • *processus néoplasique* argerzh nevezwe.

prochémie ◇ **procheilia** ◇ **rakweuzegezh b.** Kammneuziad o c'hoarvezout eus raktourzhadur ur weuz.

procidence ◇ **procidentia, prolapse** ◇ **1 erlink g. 2 ragerload g.** 1 Diskenn ur parzh korf pe un organ, da skouer *erlink an teod e-maez ar genoù* 2 En amiegouriezh, diskenn ezreol, goude digoridigezh ar vi, eus ar funig vegel pe un ezel eus ar grouell dirak an erload.

proclive ◇ **anteflexio** ◇ **1 rakpleget aa. 2 rakstou aa. 3 rakstou aa. ; rakstouadur g.** 1 A-zivout an dent, stouet war raok 2 a-zivout ul loadur a-c'hourvez, ar penn o vezañ uheloc'h eget an treid 3 A-zivout ur gwele klañvdiñ a c'haller stouiñ war raok. Komz a reer neuze eus *rakstouadur* evit savlec'h ar gwele. Ar peurliesañ e vez seurt gwele rakstou-drekstou.

procolis ◇ **rakkamm g.** Seurtad penngamm m'emañ ar penn stouet war raok.

proconsulaire : **cou** ~ ◇ ◇ **gouzoug g. prokonsulel** Koeñvadur muiet rannbarzh ar gouzoug a ziverk ar vevenn etre ar gouzoug hag ar c'haved. Devoudet eo gant ur c'hwarrenn ec'honek gant un ensiladur er gwidoù kefin. Arsellet e vez e degouezh un diferiezh yud.

proconvertine ◇ **proconvertin** ◇ **prokonvertin g.** Parenn VII ar c'haouediñ enniñvet e konvertin.

procréation médicalelement assistée ◇ **medically assisted procreation, assisted reproduction** ◇ **engehentiñ ameleit ent vezegel (eam)** Gerienn o teanviñ teskad an hentennoù mezegel amkanet da gevaraezañ an engehentiñ : fraouaat hormonal, ensperiañ kalvezadel, frouezhigñ in vitro, h.a.

procréatique ◇ **procreatics** ◇ **engehentouriezh b.** Hollad an diskiblezhioù gouzuel ha kalvezel o plediñ gant an engehentiñ kalvezel.

procritique ◇ **procritical** ◇ **rageizik aa.** A-zivout ar prantad diouzhtu a-raok eizigenn ur c'hleñved.

proctalgie ◇ **proctalgia** ◇ **fraezhost b.** Nervost ar fraezh.

proctectomie ◇ **proctectomy** ◇ **youlc'hezvenañ** Dazbidañ un drailhenn eus speur gloestr ar youlc'h — ar peurliesañ ar speur adreñv — war-benn parraat ouzh islink ar youlc'h.

proctite ◇ **proctitis** ◇ **youlc'hfo g.** Tanijenn ar youlc'h (sl. *rectite*).

proctocèle ◇ **proctocèle** ◇ **youlc'hogad g.** Islinkad ar youlc'h (sl. *rectocèle*).

proctoclyse ◇ **enema** ◇ **youlc'holc'hiñ** Diounit ul liñvenn gengrennek dre ar fraezh. Menegomp *engwelc'h kendalc'hek ar youlc'h, enema g. -où* (Gl. *proctoclyse continue, Sz. proctoclysis*), Youlc'holc'hiñ gorrek diwar-bouez un trevnad arbennik a-zidakenn (sl. *rectoclyse*).

proctococcypexie ◇ **proctococcypexy** ◇ **Aanlenañ youlc'h-belost, youlc'hbelostAanlenañ** Festañ surjaniel speur adreñv ar youlc'h ouzh parzh arak ar belost, war-benn dereizhañ ur youlc'hislink (sl. *rectococcypexie*).

proctocolpoplastie ◇ **proctocolpoplasty** ◇ **atelviñ youlc'h-gouin, youlc'hgouinatelviñ** Serrinñ surjaniel ur fic'h youlc'h-gouin (sl. *rectocolpoplastie*).

proctocystoplastie ◇ **proctocystoplasty** ◇ **atelviñ youlc'h-c'hwezhihell, youlc'hc'hwezhihellatelviñ** Serrinñ surjaniel ur fic'h youlc'h-c'hwezhihell (sl. *rectocystoplastie*).

proctocystotomie ◇ **proctocystotomy** ◇ **c'hwezhiellenbenañ youlc'hel** Enbenañ ar c'hwezhihell dre ar youlc'h.

proctodéum ◇ **proctodeum** ◇ **arc'hfraezh g.** Emouinadur an ektoderm rizhellel el lec'h a zeuy da vezañ ar fraezh diwezhatoc'h.

proctologie ◇ **proctology** ◇ **youlc'houriezh b.** Diskiblezh vezegel o plediñ gant anaezioù ar fraezh hag ar youlc'h.

proctologue ◇ **proctologist** ◇ **youlc'hour g. -ion** Mezeg arbennikaet war gleñvedoù ar fraezh hag ar youlc'h.

proctopérinéoplastie ◇ **proctoperineoplasty** ◇ **atelviñ garbedenn-youlc'h, youlc'hgarbedennatelviñ** Surjianerezh atelviñ ar youlc'h hag ar c'harbedenn (sl. *rectopérinéoplastie*).

proctopérinéorrhaphie ◇ **proctoperineorrhaphy** ◇ **dlita youlc'h-garbedenn, youlc'hgarbedenn dlita** Oberatadenn unan-atelviñ amkanet da zazluniañ kelc'hstrishaer ar fraezh aet laosk pe antant da-geñver islink ar youlc'h (sl. *rectopérinéorrhaphie*).

proctopexie ◇ **proctopexy** ◇ **youlc'hAanlenañ** Festañ ar youlc'h ouzh speur adreñv kavenn al lestr (sl. *rectopexie*).

proctoplastie ◇ **proctoplasty** ◇ **youlc'hatelviñ** Surjianerezh atelviñ ar youlc'h pe ar fraezh (sl. *rectoplastie*).

proctoptose ◇ **proctoptosis** ◇ **youlc'hogad g.** (sl. *proctocèle, rectocèle*).

proctorragie ◇ **proctorrhagia** ◇ **youlc'hwadliñvañ** Karzhadur dre ar fraezh eus gwad ruz o tont eus ar youlc'h, e kemm diouzh ar melena o naouiñ dre karzhadur gwad du.

proctorrhaphie ◇ **proctorrhaphy** ◇ **youlc'hdlita** Krafaelañ speur ar youlc'h (sl. *rectorrhaphie*).

proctorrhée ◇ **proctorrhea** ◇ **youlc'hnaouez** b. Diver glaourek dre ar fraezh.

proctoscopie ◇ **proctoscopy** ◇ **youlc'hengweliñ** Imbourc'hiñ gweledel ar youlc'h diwar-bouez ur rektoskop (endoskop outañ un trevnad goulaouiñ ebarzhed dre ar fraezh) (sl. *rectoscopie*).

proctosigmoïdectomie ◇ **proctosigmoidectomy** ◇ **ezvenañ youlc'h-sigma, sigmayoulc'hezvenañ** Dazbidañ ar youlc'h hag ar c'holon sigma (sl. *rectosigmoïdectomie*).

proctosigmoïdite ◇ **proctosigmoiditis** ◇ **youlc'hsigmafo** g. Tanijenn ar youlc'h hag ar c'holon sigma (sl. *rectosigmoïdite*).

proctosigmoïdoscopie ◇ **proctosigmoidoscopy** ◇ **youlc'hsigmaengweliñ** Imbourc'hiñ gweledel ar youlc'h hag ar c'holon sigma diwar-bouez un endoskop bouk (sl. *rectosigmoïdoscopie*).

proctostomie ◇ **proctostomy, rectostomy** ◇ **youlc'hezforzhañ** Dewerc'hañ un digor padek evit ar youlc'h, ar peurliesañ e sell d'an adfraezhañ (sl. *rectostomie*).

proctotomie ◇ **proctotomy, rectotomy** ◇ **youlc'henbenañ** Gwezhiadenn war ar fraezh hag ar youlc'h, amkanet da barraat ouzh ar strishadur anezho (sl. *rectotomie*).

procubitus ◇ **1 ventral decubitus 2 prolapse of the umbilical cord** ◇ **1 rakgourvez** g., **gourvez a-gof 2 ledan-kad** g. 1 Load ar c'horf astennet war e gof 2 Diskenn anreol, a-raok digoridigezh ar vi, eus ur wedenn a 'r funig vegel e-kichen pe dirak an erload. Ar verb *ankañ* "mont" a gaver amañ. An erload oc'h enankañ, o tiskenn (o treugañ), hag oc'h ec'hankañ, e vez ar wedenn funig o tiskenn en e gichen, gennet etre ar vi ha speur naoz ar genel.

prodrogue ◇ **prodrug** ◇ **raklia** g. Diaraoger ul lia gwezhus war-lerc'h ur bevdeuzfurmadur.

prodrome ◇ **prodrome** ◇ **ragazon** g. Arouez pe azon oc'h erzerc'haat deroù ur c'hleñved.

productif ◇ **productive** ◇ **1 usparadek** aa., **usweek** aa. **1 kraostus** aa. 1 A-zivout ur gouli pe un anaf o naouiñ dre reñver neriñ ur gwiad nevezfurmet 2 A-zivout ur paz gant kraostadoù.

produit sanguin ◇ **blood product** ◇ **aozad g. gwadel** Danvezenn douhennet eus ar gwad. an *aozadoù gwadel stabil* (albumin, immunoglobulinoù, parennoù kaouediñ) a anver *liaoù deveret eus ar gwad*, e kemm diouzh an *aozadoù gwadel bresk* (devec'hiadoù hemati, devec'hiadoù pladanoù, gwad klok).

produit de contraste baryté ◇ **baryum contrast medium** ◇ **baritaozad g. dargemm** Sulfat barium e rezh un arlugaad dourel, arveret dreist holl evit skinimbourc'hiñ ar ganol vezhur.

produit de contraste iodé ◇ **iodine contrast medium** ◇ **iodaozad g. dargemm** Bez' ez eus daou rizh a iodaoadoù : ar re zourzileizh a c'hell bezañ diouezet ent genaouel (bestlgellennluniñ) pe ent engwazhiadennel (lestrluniñ) hag ar re zruzenndileizh arveret evit imbourc'hiñ ar c'havennoù ankehent gant ar wazhiadurezh.

produ-

- *la production des anticorps est attribuée aux plasmocytes* paridigezh an antikorfoù a ve arc'hwel ar plasmokit • *faisceau d'électrons produits par la cathode* hordenn elektron dedaolet gant ar c'hatod • *produit antibiotique* danvezenn vevastaler • *produire des effets* dec'han gweredoù • *production excessive de gaz dans le colon* reformiñ aezhenn er c'holon • *capable de produire de la graisse* o tisoc'h gant amparadur ar behin • *les produits de ce groupe* gwezherioù ar rumm-mañ • *incapacité de produire des réponses immunitaires normales* diouested da ren erwezhioù hangaeel reol • *produits de dégradation du fibrinogène* danvezennoù diwar zispenn ar fibrinogen • *le produit de sécrétion* dedaolad ar borc'hañ • *l'image produite par un amplificateur de luminance* ar skeudenn dedaolet gant ur skedamplañ • *à la peau sont annexées des productions secondaires cornées* ouzh ar c'hroc'hen e vez adfurmadurioù karnek • *produit de l'action de la rénine sur un substrat* dedaolad diwar wered ar renin war un dindanad • *les intensités électriques nécessaires pour produire le son* an tredanreadoù ret da zec'han ar sten • *le produit issu d'une réaction chimique* an aozenn o tisoc'h diouzh un dazgwered kimiek • *produit organique* dafar bevel • *produit de la sécrétion* borc'had • *produit secondaire de l'oxydation* eilaozad diwar oksidañ • *produit de condensation de l'urée* disoc'h diwar gendouesadur an urea • *produits iodés* iodaoadoù • *les quantités de chaleur produites dans un espace clos* ar gwrezadoù oc'h arloc'hañ en un ec'honenn gloz • *produits de dégradation* ec'haozadoù • *produire et concentrer un faisceau* genel ha tolpañ un hordennad • *la production et destruction des éléments figurés du sang* parañ ha loezañ elfennoù luniek ar gwad • *sous-produit* adkenderc'had • *produisant de l'énergie* o tilaoskiñ gremm • *injecter un produit dans un conduit* ensinklañ un aozad en ur ganol • *hyperproduction locale* uskresk lec'hiek • *hyperproduction de ciment* uspar diraskorn • *produit au cours de la fission nucléaire* ganet diwar skiriañ an derc'han • *les ions produits par un rayonnement* an ion ganet gant ur skinad • *transmis par les produits animaux* treuzkaset dre an dedaoladoù loenel • *produit pharmaceutique* aozad liaerezh, aozad apotikel, lia • *produits, objets et instruments destinés aux soins du corps* kenderc'hadoù, traezoù ha binvioù evit an arouelioù korf • *produits de digestion des graisses* druzennoù koazhet • *faculté de produire et d'utiliser des hormones androgènes* perzh (ur bevedeg) da enaozañ ha da zewezhiañ hormonoù androgen • *un corps étranger ou une production pathologique* ur c'horf estren pe un danvez kleñvedel • *fonction de la glande mammaire de produire du lait* arc'hwel parañ laezh gant gwagrenn ar vronn • *production pathologique* dedaolad kleñvedel • *produire par génie génétique* dewerc'hañ dre enaozañ hilouriel • *productions sarcomateuses* dedaoladoù sarkomatus • *produits de réserve intracytoplasmiques* kadavennoù enkitoplasmel • *produits naturels tels que l'urine* an dedaoladoù naturel evel an troazh • *production de nodules cancéreux* dedaoladur ozvennoù kankrek.

proencéphale ◇ **proencephalus** ◇ **empennogadeg** g. -eiona-dal, talempennogadeg Krouell euzhek dezhañ un ogad empenn dre un igorenn er rannbarzh tal.

proenzyme ◇ **proenzyme** ◇ **proenzim** g. Danvezenn brotided hep gwerederezh enzimateg a ro, avat, un enzim niñvek dre vlivadur (sl. *zymogène*).

proérythroblaste ◇ **proerythroblast** ◇ **proeritroblast** s. Kellig mel an eskern, diaraoger kentañ an ac'had eritrokitek. ar proeritroblast zo bazennlen, dezho ur graoñell vras hag enno nukleolennoù.

Proetz : méthode de ~ ◇ **Proetz's treatment** ◇ **hentenn b. Proetz** Prederiadur ar c'hevfoioù dre leuniañ ar c'hevioù gant dileizhennoù gwezheriañ, en ur embreger ur gwask leiel spanaennek. En doare-se e saveler e kavenn ar fri un iswask a suc'h aer ar c'hevioù, pezh a gevaraez d'al liñvenn kemer e lec'h er gavenn, ar penn o vezañ bet lakaet en ul loadur dianaou dereat.

profession-

• *professions médicales* micherimezegel • *professions paramédicales* micherioù lezvezegel • *professions de santé* micherioù yec'hedel • *maladie professionnelle* kleñved micherel • *maladie essentiellement professionnelle* kleñved micherel strizh • *non professionnelle* anvicherel • *socioprofessionnel* kedvuhezeg-micherel.

profibrinolyse ◇ **profibrinolysin, plasminogen** ◇ **profibrinolizin** g. Enzim bezant ent reol er plasma er stad anniñvek a c'hell bezañ enniñvet e fibrinolizin niñvek dindan wered ur c'hinaz a orin gwiadell (kinaz borc'h gant speurioù gwazhiedel pa c'houzard fibrin warno, lizokinaz pe fibrinokinaz, paot dreist holl er skevent, ar grozh hag ar raksavenn; urokinaz) pe bakteriel (streptokinaz). Ar c'hediad profibrinolizin-kinaz a vez anvet a-wechoù *kemplezh plasminogen-kinaz*. Bec'h ar *p.* er gwad zo gavaelet etre 15 hag 20 mg evit 100 mL (sl. *lipoprotéine hag activateur tissulaire du plasminogène*).

Profichet : syndrome de ~ ◇ **Profichet's syndrome** ◇ **azoniad g. Profichet** Furmadur argammedek ozvennoù razek endan-groc'hen dianav an arbenn anezho, sezet e-kefin an arzoù hag ar bizied dreist holl, kevret gant strafuilhoù istefivel ha nerveel.

proflavine ◇ **proflavine** ◇ **proflavin** g. Poultr gell arruz, dilester a-ziavaez, arveret war zileizh e prederiadur ar goulioù poreet (heñvester : *diaminoacridine*).

profus ◇ **profuse** ◇ **puilhek aa.** A-zivout borc'hadoù ha diouladoù paoterek, da skouer *darc'hoal puilhek, c'hwezennoù puilhek*.

progenèse ◇ ◇ **ragengehentelezh b.** Amveziadoù o tennañ da zelanvad ar parennoù hilel hag anhilel war ziorreadur ar maban.

progénie ◇ **progatism** ◇ **rakload g. an elgezh** Kammneuziad anezhi dilec'hiadur an elgezh war raok (sl. *latérogénie, rétrogénie*).

progéniteur ◇ **progenitor cell, colony forming unit, cfu** ◇ **rakganer aa. & g. -ioù** Kellig wadparañ liesac'hus oc'h evodiñ eus ar vongellig hollac'hus, oc'h emdreuzfurmiñ e diaraoger ur gellig azv. Ar rakganer zo dezhañ ar galluster da gas etrezek un nebeut hentoù diforc'hekaet hepken : en ac'had kelligoù ar gwad dreist holl – mieloid pe limfoid – e c'hell disoc'h gant n'eus forzh petore kellig azv eus unan a'n daou hent-se. Ent reol ez eo an diaraoger peuzrur'haet endeo, ha menegiñ a reer da skouer anv un diaraoger, heuliet gant an adanv a-zave d'ar gellig azv evodet dioutañ : limfokitel, neuronel, gliel, avuel, osteoblastel... Stad kentaer ar gellig diforc'hekaet eo, na erzerc'h ket evit c'hoazh he fenotip holl.

progéniture ◇ **progeny** ◇ **ganadur g.** Teskad ar vugale engehentet gant ur c'houblad.

progérie ou progeria ◇ **progeria** ◇ **progeria** g. Anvet ivez *azoniad Hutchinson-Gilford* – *Sz. Hutchinson-Gilford syndrome* – ez eo ar progeria ur c'hleñved dibaot a'r vugale o naouiñ dre ur c'hoshaat rakkoulz gant skorted c'hanadel, korregezh kreñv, mineuz dremmel "penn labous", moalded hag ezvezañ an divabrant. Ar c'hroc'hen a ya roufennek, gourlivegek, isteñvek, an darn vrasañ eus ar c'houzviaded zo hep behin endan-groc'hen. An arterioskleroz, ar barradoù kevenkez bruched hag al ledseizi a zevoud ar marv en un oad yaouank.

progestatif ◇ **1 progestational, progestogen 2 progestin** ◇ **1 bec'haraezus aa. 2 bec'haraezer g. -ioù ; progestativ aa. & g. -où** 1 Araezus d'ar vec'hiegi o telankañ un treuzfurmadur eus glaourgenn ar grozh emsavus da enneizhiad ar vi 2 Nep danvezenn evel ar progesteron, hormon naturel, pe nep hormon kevanaozel dezhañ an hevelep perzhioù. Arveret e vez ar bec'haraezeroù e strafuilhoù 'zo a'r mizioù, a'n endometrioz, a'n arvarioù kolladennoù ha, kevret gant an estrogenoù, evel hilastalerioù.

progéstérone ◇ **progesterone** ◇ **progesteron** g. Hormon steroidel borc'h gant ar c'horf melen, ha goude gant an dorzhienn, evit prientiñ an enkrozhenn da englenadur ha diorreadur ar vi speriet. Arveret e vez e rezh ensinkladoù e prederiadur strafuilhoù ar mizioù hag evit dizarbenn ur golladenn. Bez' ez eo ivez un aozad treugel e bevenaoz an hormonoù steroidel all er gwagrennoù enborc'hañ all. Heñvelsterioù ar progesteron zo an termennoù *lutein* pe *hormon luteal*.

progestine ◇ **progestin** ◇ **progestin** g. Anv kentañ ar progesteron.

progestogène ◇ **progestogen** ◇ **progestogen** g. Heñvelster gant *bec'haraezer, progestativ*.

progestomimétique ◇ **progestomimetic** ◇ **progesteronvanek aa.** Letefivel ouzh ar progesteron.

proglottis ◇ **proglottid** ◇ **proglotiz** g. Rann pe gwalenn korf ar c'hestod, evel an tenia.

prognathe, -gnathie ◇ **prognathic, prognathous, prognathic** ◇ **1 ragavenek aa. 2 ragaveneg g. -eion** 1 A-zivout kefluniadur ar fas hevelep ma hañval un pe an div aven rakvalirañ dirak linenn al letu etre an tal hag an elgezh 2 Hinienn ragavenek.

prognathisme ou **prognathie** ◇ **prognathism** ◇ **ragavenegezh** b. Kefluniadur ragavenek ar fas. Klok eo ar *r*: mard eo degouezh an div aven.

prognose ◇ **prognosis** ◇ **erdebiñ** (sl. *pronostic*).

progonome ◇ **progonoma** ◇ **progonom** g. Yoc'henn rizhellviweel evodet diouzh gwiadoù diforc'hekaet nebeut kenan, o klotañ gant lankadoù deroù diorreadur ar rizhell.

progranulocyte ◇ **progranulocyte** ◇ **progranulokit** s. (sl. *promyélocytes*).

progress-

• *accélérer progressivement le débit de l'élocution* buanaat tamm-ha-tamm tead an distilh • *angiome multiple progressif* angiome liesek argreskus • *appareil correcteur progressif* steudell dereizhañ, harpell reizhañ pazennek • *augmentation, diminution progressive* kreskiñ, digreskiñ argammedek • *calcification progressive* razekaat argammedek • *chute des cheveux, aiguë ou progressive* kouezh blev, lemm pe bazennek • *décroissant progressivement à partir d'un foyer* war zigresk argammedek adalek un annon • *dégradation progressive* bevec'haozañ argammedek • *effacement progressif* steuziad argammedek • *installation d'un courant progressif* argresk ur read tredan • *les mécanismes se déclenchent très progressivement* e vez ar gwikefreoù delusket en arouar • *leucoencéphalopathie multifocale progressive* gwennempennaoued liesannonek argammedek • *myopathie primitive progressive* kahernaoued kentael argammedek, miopatiezh • *terminaison brusque ou progressive* diwezh trumm pe argammedek • *un flux magnétique progressivement croissant* ur gwarellanvad war-gresk a-bazennadoù • *verres progressifs* gwerennoù argammedek.

prohormone ◇ **prohormone** ◇ **prohormon** g. Diaraoger un hormon.

pro-insuline ◇ **proinsulin** ◇ **proinsulin** g. Keurvolekul proteek enaozet gant kelligoù β an ilgreiz, diaraoger an insulin (sl. *insuline*).

projec-

• *lieu de projection et de réception des sensations visuelles* lec'h enodiñ an arhentoù gweledel • *mouvement de projection, de lancer, et de torsion des membres* fiñvoù bannañ, stlepel, gweañ an izili • *projectile inclus dans le corps, ayant traversé le corps* saezhell ebarzhat, saezhell drebarzhet • *zone de projection occipitale des voies visuelles* parzh ar bluskenn gilpenn ma tisoc'h ar saezhennadur a-weled.

projet d'établissement ◇ **hospital project** ◇ **erbar** g. **diabezadur** Teul dervantiñ gouestlet da leviadurezh war hir dermen ha da zurc'hadurioù da zont un diazezadur yec'hed, ha d'an araezioù da bengenniñ.

prolactine ◇ **prolactin** ◇ **prolaktin** g. Hormon polipeptidek laezhvorc'heiat borc'het gant ar rakgougorfenn a zec'han al laezhvorc'hañ goude ar gwilioudiñ hag a skoilh ouzh ar vic'hadiñ. Ouzhpenn se e kevaraez enborc'hadur ar progesteron, o lakaat evel se ar c'horf melen da arc'hwelañ. A se an anv all a roer dezhañ : *hormon luteotrop* pe *luteotropin*.

prolactinémie ◇ **prolactinemia** ◇ **gwadvec'h** g. **prolaktin, prolaktinwadvec'h** Bec'h ar prolaktin er gwad, reol etre 2 ha 15 ng/mL pe etre 0,08 ha 6 nmol/L.

prolactinome ◇ **prolactinoma** ◇ **prolaktinom** g. yoc'henn c'hougorfennel (adenom livlez peurliesañ) o vorc'hañ prolaktin. Devoudañ a ra un azoniad laezhver-mizanliñv gant ar venev hag un digresk eus al libido gant ar gourev (sl. *aménorrhée-galactorrhée* : *syndrome* ~).

prolan ◇ **prolan, chorionic gonadotropin** ◇ **prolan** g. (sl. *gonadostimuline, gonadotrophine, hormone gonadotrope*).

prolanémie ◇ **prolanaemia** ◇ **gwadprolanegezh** b. Bezañs prolan er gwad.

prolanurie ◇ **prolanuria** ◇ **troazhprolanegezh** b. Bezañs prolan en troazh.

prolapsus ◇ **prolapse** ◇ **izad** g. Naoued o c'hoarvezout eus rikladur war drañ un organ pe ur parzh organ. Daou seurtad izadoù a ziforc'her : an *islink* (Gl. *ptose*) pa 'z eo laoskded an araezioù stagañ arbenn an izad; an *ogad* (Gl. *cèle*) pa ziskenn ar furmadur izad dre ur boulc'h en ur speur.

prolapsus anal ◇ **anal prolapse** ◇ **izad** g. **fraezhel; youlc'hislink** g. Islink glaourgenn ar youlc'h dre ar fraezh, a se an anv a *islink glaourgenn ar youlc'h ivez*.

prolapsus de l'iris ◇ **prolapse of the iris** ◇ **envezerlink** g. Erlink ur parzh eus an envez dre ur c'houliez a 'r gornsaе.

prolapsus mitral ◇ **mitral valve prolapse** ◇ **izad** g. **mintrek** (sl. *ballonnement de la valve mitrale, ballonnisation de la valve mitrale, syndrome de barlow, syndrome prolapsus de la valve mitrale-clic, syndrome de la valve flasque*).

prolapsus rectal ◇ **rectal prolapse** ◇ **izad** g. **ar youlc'h, youlc'hizad** g. Izad teir sae ar youlc'h dre ar fraezh, da heul emouinadur ar youlc'h.

prola-

• formation prolabé furmadur izat • *les viscères prolabées (dans le sac herniaire)* ar flugez ogat (er sac'h ogadel) • *prolapsus utérin* izad ar grozh, krozhizad, krozhislink • *prolapsus utérovaginal* (Sz. *frank prolapse*) izad krozh-gouin, krozhgouiniazad, izad krenn, islink krenn • *vagin prolabé* gouin izadek

-prolif-

• *coefficient de prolifération* gwezhiader neriñ • *endartérite proliférante diffuse* entalmerenno kenkizus strewek • *immunoprolifératif* hangaeneradel • *les germes proliféraient déjà dans la vessie* edo ar garvevion o neriñ endeo er c'hwezhiagell • *lésions prolifératives* anafoù kenkizus • *lymphoprolifératif* limfneradel • *myéloprolifératif* melneradel • *prolifération anarchique d'un tronc*

artériel neradur antrevn ur c'hef talmerel • *prolifération anarchique des cellules* neridigezh antrevnek ar c'helligoù • *prolifération d'un tissu* struzhañ ur gwiad • *prolifération des fibres élastiques* neridigezh ar gwiennoù dastennek • *prolifération des fibroblastes* paotidigezh ar fibroplast • *prolifération gliale* neridigezh ar glia • *prolifération in situ* neridigezh lec'hiek • *prolifération tumorale* neridigezh yoc'hennek • *prolifération vasculaire* neridigezh ar gwazhied • *proliférer par division* nerif dre emrannañ.

proligère ◇ **proligerous** ◇ **garvevionek** aa. Douger hadnnoù, a-zivout un elfenn gorfadurezh ha n'eo ket a-zivout un hinienn.

proline ◇ **proline** ◇ **prolin** g. Trenkenn birolidin karboksilek. Amindrenkenn vevanret, kedrann bouezus a 'r steuñvenn gollagen ar gwiad kenglenel.

proline-dipeptidase ◇ **proline dipeptidase** ◇ **prolin dipeptidaz** Enzim o tistagañ ar molekul prolin loet e dibenn ur peptid. An divig hêrezhel anezhañ, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, a zevoud anafoù kroc'hen hag un dilerc'h bred.

prolong-

- *chacun des cartilages prolongeant l'extrémité antérieure des côtes* pep hini eus ar migern en astenn da benn araok ar c'hostoù
- *choléstase prolongée* bestlanred hirbad • *consommation prolongée* euviñ hirbad • *dont le cytoplasme est hérissé de fins prolongements qui leur donnent un aspect chevelu* houpet diwarno ur greuichennad astennadoù protoplasm • *dysfonction prolongée* miar-c'hwel hirbad • *greffon osseux disposé dans le prolongement de la surface d'une articulation* imboudenn askorm stignet war astenn un talbenn kenvelañ • *inhalation prolongée* enanaladur a-bad • *partie du tube cardiaque de l'embryon prolongant le ventricule* parzh eus ar ganol arc'hkallon ar rizhell en astenn d'ar c'hofig • *potomanie prolongée* diedvar hirbad • *prolongé en bas par* kendalc'het en traoñ gant • *prolongement cytoplasmique* astenn kitoplasm • *prolongement des cellules bipolaires* astennad ar c'helligoù daouvleñ • *prolongement protoplasmique* astennad protoplasm • *spasme respiratoire prolongé* andag enanalañ hirbad • *utilisation prolongée* hirarver • *vomissements prolongés* c'hweladoù war hir amzer.

prolydipeptidase ◇ **prolyldipeptidase** ◇ **prolydipeptidaz** g. Unan eus an enzimoù oc'h amparañ an erepsin. Distagañ a ra ar prolin diouz ar polipeptidoù.

promastocyte ◇ **promastocyte** ◇ **promastokit** s. Kellig a 'r gwiad kenglenel, etreat d'an histioblast ha d'ar mastokit.

promégalo blast ◇ **promegaloblast** ◇ **promegaloblast** s. Kelligoù usventek (eus 25 da 35 µm), dezho ur c'hitoplasm bazennlen ha kromatin greunigaouek.

promonocyte ◇ **promonocyte** ◇ **promonokit** s. Kelligoù eus ar steudad monokitel, direoliek o c'hraoñell, bezant er mel eskern, oc'h evodiñ eus ar monoblast hag o tisoc'h gant ar monokit.

promontoire ◇ **promontory** ◇ **penntir** g. -ioù Tosenn pe valir askorn, evel penntir al lestr.

promoteur ◇ **promoter** ◇ **herouezer** g. -ioù Kemalad DNA loet en argrec'h d'ar c'henenn, ma teu kemplezhioù proteek da lenañ : el lec'h-se eo e vo delanket treuzskrivadur ar c'henenn gant an NRA-polimeraz.

NOTENN : Ar peurliesañ e tigemmer tri farzh en un herouezer : a) an herouezer izek pe herouezer pennañ (Sz. *core promoter*, Gl. *promoteur central ou minimal*) loet en argrec'h d'ar parzh deroù a'n treuzskrivadur, b) an herouezer nezek (Sz. *proximal promoter*, Gl. *promoteur proximal*) ha c) an herouezer pellek (Sz. *distal promoter*, Gl. *promoteur distal*).

a) Pennañ elfennoù an herouezer izek zo ar voest TATA (1/3 eus an herouezierioù denel), ur c'hemalad BRE (Sz. *TFIIB recognition element*, TF = Sz. *transcription factor* Br. *parenn dreuzskrivañ*) e 12 % eus an herouezierioù, en argrec'h diouzhtu d'ar voest TATA, un elfenn deraouekaot (Sz. INR, *initiator element*), ur c'hemalad DPE (Sz. *downstream promoter element*) evit a sell an herouezierioù hep boest TATA, gant un elfenn INR avat hag erfin ur c'hemalad MTE (Sz. *motif ten element* war-lerc'h an IRN, en herouezierioù hep boest TATA na DPE.

b) Ar parzh anvet *herouezer reoler* en arbenn d'e arc'hwel pe *herouezer nezek* en arbenn d'e sez, zo en argrec'h diouzhtu d'an herouezer izek. En herouezer nezek ez eus daou rizeh a c'houlunioù : ar voest CAAT hag ar voest GC.

c) Evit an herouezer pellek e c'haller kaout muiaerioù (Sz. *enhancer*, Gl. *amplificateur*) ha goudaverioù (Sz. *silencer*, Gl. *silenceur*), elfennoù o tezvonnañ parzhioù DNA : an drederioù (Sz. *insulator*), parzhioù reoliñ lokuzioù (Sz. LCR, *low copy repeats*) hag ivez parzhioù enlenañ ouzh pleuskenn ar gaoñell (Sz. MAR, *matrix-associated region*).

Ar muiaerioù zo kemaladoù DNA ma len lies parenn dreuzskrivañ en araez da greskiñ feur treuzskrivañ ur c'henenn, na pa vefent pell diouti, bennozha da gammadur an DNA. Ar muiaerioù a c'hell kentraouiñ treuzskrivadur n'eus forzh pe herouezer loet en o amen. Arc'hwelañ a ra ar goudaverioù en hevelep doare.

promyélocyte ◇ **promyelocyte** ◇ **promielokit** s. Kelligoù eus ar steudad granulokitek bezant er mel eskern, etreat d'ar mieloblast ha d'ar mielokit, dezho un treuzkiz 20 µm, ur gaoñell alies hep nukleol hag ur c'hitoplasm bazennlen evit c'hoazh, ennañ greunennadoù azurlen ha greunennadoù spesadek (neutrofil pe eozinlen).

pronateur ◇ **pronator** ◇ **palvstouer** aa. A-zivout ur gigenn o kemer perzh er palvstouiñ.

pronation ◇ **pronation** ◇ **palvstouiñ** Fiñv an arvrec'h o lakaat an dorn da c'hweldreiñ eus an tu diavaez war an tu diabarzh.

pronation douloureuse des enfants ◇ **Goyrand's injury, pulled elbow** ◇ **palvstouiñ laurek ar vugale** Gouseizi laurek ar vrec'h war-lerc'h ur sachadenn rust war an ezel krec'h.

pronéphros ◇ **pronephros** ◇ **pronefroz** g. Parzh araok ar mezonefroz o tifourkañ er c'hloak dre ar san lez-krennlounezh.

pronograde ◇ **pronograde** ◇ **warraokkenkat** aa. A gerzh stouet war raok. Dre astenn ster, a gerzh gant loadur ar c'horf a-zremm, evel ar pevarzroadeget. Da lakaat e kemm ouzh *warsavkenkat*.

pronormoblaste ◇ **pronormoblast** ◇ **pronormoblast** s. Kelligoù dezho un treuzkiz etre 20 ha 25 µm, ur protoplasm bazennel kenañ, ur graoñell vras teñval : bongelligoù ac'had reol ar c'helligoù ruz; deverañ a reont war-eeun eus an hemokitoblast o c'hened an normoblast (eritroblast mentet reol) (sl. *pro-érythroblaste*).

pronostic ◇ **prognosis** ◇ **erdebiñ** Rakwelout dedroadur ur c'hleñved, hag ivez an diwezh anezhañ, evit ur gouziviad savelet.

pronosti-

- *pronostic* erdeb • *pronostic fatal* erdebad gweudek • *pronostic réservé* erdebad gougelat • *pronostic spontané* erdebad kraï
- *pronostic sévère* erdebad arvarek • *pronostic vital* erdebad tonkadel.

pronocléus ◇ **pronucleus** ◇ **pronukleüz** g. Pep hini eus an div graoñell haploidel, gourevel ha benevel, bezant er vi frouezhiget a-raok o uniedigezh.

pro-opiomélanocortine ◇ **proopiomelanocortin** ◇ **proopiomelanokortin** g. Diaraoger polipeptidek an ACTH, an endomorfinoù hag an hormon melanotropek, a orin gouzerc'hvelel-gougorfennel.

propagation ◇ **propagation** ◇ **1 treledañ** **2 emledañ**, **tredizhañ**, **treledañ** 1 Evit ur wagen, ar wrez, ar sten, un arhent, an nervlanv, h. a., an doare da vont eus ul lec'h d'un anall 2 Evit un anaf, an doare d'emastenn er c'horf; evit ur c'hleñved, an doare da dizhout tachennoù all.

propag-

- *déformation* subie par un signal lors de sa propagation dans un canal distres gant un arhent bep ma treled en ur sanell • *mesure prophylactique* prise en vue d'empêcher la propagation de la peste et des maladies darbar dizarbenn ouzh treled ar vosenn hag ar c'hleñvedoù • *la propagation* (la contamination) se fait par inhalation dre an analañ e c'hoarvez an tredizhañ • *propagation* (développement) d'une maladie ou d'un phénomène pathologique emledañ ur c'hleñved pe un anadenn anaazel • *technique architecturale* dont l'objectif est le contrôle de la propagation du son dans les constructions kalvezouriezh adeiladel he amkan reoliñ treled ar sten er savadurioù • *propriété de la chaleur, de l'électricité, de l'influx nerveux d'être propagés par certains milieux, certains tissus* perzh ar wrez, an tredan, an nervlanv da vezañ treledet gant meteier 'zo, gwiadoù 'zo • *caractérisée par des pustules nummulaires ayant tendance à se propager* (à s'étendre) par leurs bords naouus dre vurbuennoù moneizek a denn da emledañ dre o ribloù • *propagation de l'activité électrique cardiaque* treled gwerederezh tredan ar galon • *tumeur maligne propagée par voie hématogène* yoc'henn yud treledet dre hent ar gwad.

propanidide ◇ **propanidid** ◇ **propanidid** g. Dieraezer hollek diounezet dre hent engwazhiennel. Dourrannadur herrek ar molekul anezhañ e kennevidadoù diwered a vir outañ a hogennañ er bevedeg o kevaraezañ un eiltroüsted herrek eus an dieraeziñ.

propanocaïne ◇ **propanocain** ◇ **propanokain** g. Dieraezer lec'hiek.

propanthéline ◇ **propantheline** ◇ **propantelin** g. Deverad kevanao an amoniom perbonadel dezhañ perzhioù parasimpatoliek heñvel ouzh re an atropin. Degas a ra skoilh e borc'hañ ar stomok.

properdine ◇ **properdin** ◇ **properdin** g. Gammaglobulin bezant e plasma ar gwad o tasperzhiañ e blivaat ar glokaenn dre an hent dazeilat. Bakterilazhus eo, gant un dasperzhiadur pouezus en hangaeañ naturel.

propéritonéal ◇ **properitoneal** ◇ **rak-ampelenn** Loet dirak an ampelenn a-speur. A-zivout an ogad loet etre an ampelenn ha speur ar c'hof.

prophage ◇ **prophage**, **probacteriophage** ◇ **profag** s. Tammad DNA ar bakteriofag o vont gougevan ouzh kromozom ar bakteri hag a vo treuzkaset gantañ dre zasparaan azeiladoù da vare emrannadur ar bakteri. An holl vakteri merc'h o deus enta a-hêrezh hilstlennad ar bakteriofag; hogen ar vakterioleuzusted anezhañ a chom enkelat, en araez avat da vezañ delanket a-greiz holl (da skouer dindan delanvad hormonoù pe danvezennoù kankreiat), o tevoudañ loezadur ar bakteri, gant dilaosk ar bakteriofag klok.

NOTENN : *profag amwerc'h* :

profag a vir outo un namm hilel a emdreuzfurmiñ e bakteriofag anialek.

prophase ◇ **prophase** ◇ **profaz** g. Kentañ pazenn ar mitoz, ma vez ar c'hromozomoù war zouesaat : war verraat ha war devaat emaint.

prophylaxie ◇ **prophylaxis** ◇ **ergurañ** Teskad an araezioù amkanet da zizarbenn dinod pe dreled ar c'hleñvedoù. An ergurañ a c'hell bezañ hiniennel pe strollennel.

prophyl-

- *antibio prophylaxie* bevastalergurañ • *chimio prophyl-axie* kimiergurañ • *mesure prophylactique* darbar dizarbenn • *soins prophylactiques* prederioù ergurañ.

propiolactone ◇ **propiolactone** ◇ **propiolakton** g. Danvezenn arveret war zileizh evit dishadennañ an imboudoù gwazhiedel hag evit prientiñ vaksinoù 'zo.

propionibacterium acnes ◇ **propionibacterium acnes** ◇ **propionibacterium acnes** Spesad bakteri anaervevat Gram +, peurliesañ kelanat war ar c'hroc'hen. Dasperzhiañ a reont e tanijenn bolc'hennoù soavel an akne.

propipette ◇ **pipette bulb**, **pipetting bulb** ◇ **perenn** b. **bibellañ** Ardivink amparet gant ur berenn gaoutchoug, outi tri zrapig, a dalvez da erlemel ha da zinaouiñ ul liñvenn hep sunañ gant ar genoù.

proplasmocyte ◇ **proplasmocyte** ◇ **proplasmokit** s. Kelligoù gwia del eus ar steudad plasmokitel, etreat d'ar plasmoblast ha d'ar plasmokit.

propoxyphène ◇ **propoxyphene** ◇ **propoksifen** g. Keveler luniadel ar metadon, arveret evel dic'hoster evit al laurioù leiek pe leiekoc'h, kevredet a-wechoù gant an aspirin pe ar paraketamol.

propranolol ◇ **propranolol** ◇ **propranolol** g. Gourzhaler kevezer ar betaadrenvuzerioù. Kentañ kediad kontradet er c'hlinik e voe ha pimpatrom ur stroll liaoù anvet betadolc'herioù, en o zouez an oksprenolol, ar solatol, ar pindolol, ar praktolol, an atenolol, ar metoprolol, h.a. Dedalvezet eo e pederiadur ar c'hevenkez, migorvezioù 'zo, an uswask talmerel, ar c'hernad.

propriocepteur ◇ **proprioceptor** ◇ anunfraouaer g. Fraouaer loet e penn forzhioù an eraezñ endonfraouadel.

proprioception ◇ **proprioception** ◇ **eraezñ loc'hadel, loc'heraezñ** Santout al loc'hoù o c'hoarvezout gant parzhioù hon c'horf.

propr-

• *angiome propre au système nerveux central* angiom piaouel d'an nerved kreiz • *dents prothétiques et dents propres* dentosod ha dent piaouel • *liquide dont la propriété est de s'étendre* liñvenn a zo he ferzh emledañ • *propriété de deux gènes allèles* perzh gant div c'henenn allel • *propriétés antigéniques* perzhioù antigen • *propriétés hapténiques* perzhioù haptén • *propriétés organoleptiques* perzhioù merzhadennel • *propriétés protectrices* perzhioù gwareziñ • *sensibilité profonde et proprioceptive* eraezñ endon- hag anunfraouadel • *ses propriétés antigéniques et immunisantes* e antigenegezh hag e hangaëusted • *stimulations proprioceptives* anunfraouadoù.

propulsion¹ ◇ **propulsion** ◇ **erluskañ** Goulankañ ur fiñv d'ur c'horf dindan wered un nerzh bountañ.

propulsion² ◇ **propulsion** ◇ **rakkorzhañ** (sl. *antépropulsion*).

prorénine ◇ **prorenin** ◇ **prorenin** g. Diaraoger anniñvek ar renin o c'hoarvezout anezhañ hag eus ur raktammad ouzhpenn amparet gant 46 amindrenkenn.

prosécrétine ◇ **prosecretin** ◇ **prosekretin** g. Danvezenn furmet e par glaourgenn an daouzegenn, a emdrezfurm e sekretin en ur metoù trenkek.

proscéphale ◇ **prosencephalon** ◇ **ragempenn** g. Teskad parzhioù an empenn evodet eus arc'hkellenn arak an empenn : al ledempennoù, ar rizennegoù, an tolbezennoù c'hweshael, an derc'hvel, an trede kambr hag ar c'hambrou kostezel.

prosopagnosie ◇ **prosopagnosia** ◇ **andenaoud an dremmoù, dremmandenaoud** g. (sl. *agnosie pour les visages*).

prosopalgie ◇ **prosopalgia** ◇ **nervost b. an dremm, nervost trigevell, dremmost** (sl. *névralgie faciale, névralgie du trijumeau*).

prosoplasie ◇ **prosoplasia** ◇ **tarwe** g. Trewe argammedek, diforc'hekadur anreol ur gwiad.

prosoposchisis ◇ **prosoposchisis** ◇ **prozoposkiziz** g. Skarr ganedigel an dremm.

prostacycline ◇ **prostacyclin** ◇ **prostakiklin** g. Danvezenn nes d'ar prostaglandinoù deveret diwar an drenkenn arakidonek, bevenaozet en endotelienn ar gwazhied hag e kelligoù endotelel ar skevent. Kelligwarezus, gwazhiedfrankaus hag enepladandazus gwerc'hek eo. An arver anezhañ e pederiadur ar gwazhied (uswask) a hañval bezañ enneget. Distabil kenan eo avat : tri munud eo e hoali.

prostaglandine ◇ **prostaglandin** ◇ **prostaglandin** g. Anv hollek ur steudad kediaoù eus stroll an trenkennoù druz amvec'h, dezho 20 atomenn garbon, ul luniad korvell gant pemp atomenn garbon e-kreiz ar volekulenn (korvell pentanek), lies stroll bleinek hag un niver bennak a ereoù daouel. Deverañ a ra ar prostaglandinoù eus an drenkenn arakidonek ha c'hoarvezout a reont eus 9 rumm eus PGA da PGI. Parennoù gwezhus ent bevedel ez int, bezant e-barzh hogos an holl rizhoù kelligoù, nemet an eritrokitoù. Lies gwered zo dezho : kevaraezañ a reont ar gwilioud, ar pladandazañ ha dasperzhiañ en danijenn hag en hangae, h.a. Ar prostaglandinoù, ar prostakiklin hag an tromboksan a zeve eus an drenkenn arakidonek. Ar raksavenn — en orin an anv roet d'an danvezennoù-se, dizoloet el liñvenn sperel — zo enni ur c'hementad bihan a-walc'h a brostaglandinoù.

prostatalgie ◇ **prostatalgia** ◇ **raksavennost b.** Laur er raksavenn.

prostate ◇ **prostate** ◇ **raksavenn b.** Organ gwagrennel gourevel loet en dro da c'houzoug ar c'hwezbigell hag un darn eus ar c'han troazh, a c'hoarvez eus div dolbezenn gostezel dispartiet gant un nant hag eus un dolbezenn grenn. Amparet eo ar raksavenn gant ur stroma kenglenel ha kahelel ha gant ur parenkim a wagrennoù bihan stalet e blokadoù, dezho bep a san o tigeriñ e rann raksavennel ar c'han troazh hag o tinaouiñ ennañ al liñvenn vorc'het, a emvesk gant ar sper e koulz an derodiñ.

prostatectomie ◇ **prostatectomy** ◇ **raksavennezevenañ** Dazbidañ darnel pe hollel ar raksavenn. Bez' e c'hell bezañ dewerc'h-et dre an hent garbedennel, drekkaezourel, uskaezourel trec'hwezbigell, pe tregantroazhel. Tu zo da wezhiañ ivez dre engweliñ.

prostatique ◇ **prostatic** ◇ **1** ~raksavenn, raksavennel aa. **2** raksavennaouedek aa. **3** raksavennadeg g. -eion, raksavennaouedeg g. -eion 1 A-zivout ar raksavenn 2 Gant doareoù an anaezioù raksavenn 3 Gouziviad tizhet gant un anaez a'r raksavenn.

prostatisme ◇ **prostatism** ◇ **raksavennaouedegezh b.** Teskad ar strafuilhoù troazhadel diwar usvent ar raksavenn : ezhomm kaezhus hag arreat da droazhañ, gant troazhodadoù bihan, gwanadur ar flistrad, un dezioulañ diaes ha laurus alies.

prostatite ◇ **prostatitis** ◇ **raksavennfo g.** Tanijenn lemm pe henek ar raksavenn.

- prostatorrhée** ◇ **prostatorrhea** ◇ **raksavennver** g. Beradur liñvenn raksavenn dre ar c'halc'h arsellet gant ar raksavennfo henek.
- prostatotomie** ◇ **prostatotomy** ◇ **raksavennenbenañ** Enbenañ ar raksavenn.
- prosthétique** ◇ **prosthetic** ◇ **prostetek** aa. A-zivout ur stroll anproteek a zo e-barzh molekul an heteroproteinoù ha dilaosket gant dourannadur ar c'horfoù-se.
- prosthion** ◇ **prosthion** ◇ **prosthion** g. Lec'h arakañ ribl baleg logigaouek ar garvan.
- prostration** ◇ **prostration** ◇ **fillidigezh** b., **mantridigezh** b. Grevadurezh eizhañ.
- protaminase** ◇ **protaminase** ◇ **protaminaz** g. Enzim proteinloezet borc'het gant an ilgreiz en araez da zispartiañ an arginin diouzh ar protaminou.
- protamine** ◇ **protamine** ◇ **protamin** g. Protein douhennet diouzh laezhenn besked 'zo. Ar vazegezh anezhañ zo e dalc'h bec'h uhel an amindrenkennoù bazek ennañ, an arginin dreist holl. Dasperzhiañ a ra e kenaoz an insulin arzilec'h hag ar sulfat diwarnañ a dalvez da neptuiñ gwered an heparin.
- protamine : test au sulfate de ~** ◇ **protamine sulfate test** ◇ **prouad dre ar sulfat protamin** Prouad amkanet da naouaat, e plasma ar gwad, an danvezkennoù hezileizh dedaolet gant ar furmadur trombin. Dinodadur ur gel, pa azdoder er plasma un dileizhenn sulfat protamin pH 8 a zenaou bezañs an danvezkennoù-se. Peurliesañ e vez yaek ar prouad-se en azoniadoù ar c'haouledañ engwazhiedel strewek (sl. *coagulation intravasculaire disséminée : syndrome de ~*).
- protanomalie** ◇ **protanomalía** ◇ **ruziswel** g., **gwariadenn** b. **Hart** Ruzangwel leiek, gwariadenn c'hanedigel eus gwel al livioù.
- protanope** ◇ **protanope** ◇ **1 ruzangwelek** aa. **2 ruzangweleg** g. **-eion** 1 A-zivout un den tizhet gant ar ruzangwel 2 Gouziviad ruzangwelek.
- protanopie** ◇ **protanopia** ◇ **ruzangwel** g., **protanopiezh** b. Dic'halloud da verzhout al liv ruz (Gr. *πρωτός* "kentañ", al liv ruz o vezañ ar c'hentañ liv diazez).
- protéase** ◇ **protease** ◇ **proteaz** g. Enzim proteolitek o treluskañ dourannadur ereoù peptidek ar proteinoù pe ar peptidoù. Ar proteazoù a c'hoarvez eus ar proteinazoù hag eus ar peptidazoù.
- protecteur : système ~** ◇ **protection system** ◇ **reizhiad** b. **wareziñ** Teskad an eraezioù protopatek kevanekaet en empenn e par an derc'hvel hag amkanet hepken da zeluskañ an erwezhoù gwareziñ damougek pe ziarzougek.
- protéinase** ◇ **proteinase** ◇ **proteinaz** g. Enzim en araez da zigenaozañ ar proteinoù en o c'hedrannou (peptidoù hag amindrenkennoù).
- protéine** ◇ **protein** ◇ **protein** g. **-où** Bevgediad, daskediad amparet diwar amindrenkennoù evel monomeroù. C'hoarvezout a ra an digorvelloù eus 50 da 1000 molekul monomer. A-douez an 200 amindrenkenn anavezet n'eus nemet 20 o tasperzhiañ e kenaoz proteinoù ar bronneged. Ar re-se zo dezho ur roll gourfouezus, o vodañ arc'hwelioù bevedel (enzimou, hormonou, kromozomou, viruzoù), arc'hwelioù dezougen (hemoglobin, gwadveiz-albumin, proteinoù kennennel), arc'hwelioù difenn (immunoglobulinoù), hag ivez evel dafarennoù luniadel (kaherioù, migern, kroc'hen, blev). O rannañ a reer en holoproteinoù (pe proteinoù eeun) hag en heteroproteinoù. E rezh gwidennadur eeun a amindrenkennoù, e lavarer *ez eo kentael* luniad ar proteinoù. Bezañs arreat ar strolloù bleinel –CO–NH–, atomennoù sulfur zoken, zo araezus da lies kraf kimiek gallus, pezh a stabila muioù'h al luniad. Furmadur ereoù etre strolloù bleinel –CO hag –NH ankefin a zisoc'h gant luniadoù anvet *eilvedel* unvent (biñs eeun, luniad α – Pauling, 1951) pe divvent (feilhennou krizet, luniad β). Dindan wered al lies load en araez da zazgwerediñ c'hoazh e c'hell al luniad eilvedel, pe emzistummañ etrezek ur c'hefluniad teirment, anvet luniad *tredeel*. Unel eo an kez kefluniad, delanvadet kreñv avat gant ar metoù dourel diavaez (gwrezverk, pH, bec'h). Bez' e c'hell ivez ar c'hefluniad-se kevredañ ouzh reoù all hag amparañ ul luniad *pevareel* (da skouer : an hemoglobin).
- protéine C** ◇ **protein C** ◇ **protein C** Protein enepkaouledañ a 'r plasma, heuder ar parennoù V ha VIII. Furmet en avu e c'hell an divig anezhañ bezañ arzeuat pe c'hanedigel.
- protéine C réactive** ◇ **C reactive protein**, **CRP** ◇ **protein C dazgweredus** Protein anreol a 'r gwadveiz o tinodiñ pa vez tanijenn, marvenn pe yoc'henn, dezhañ ar perzh da gediañ gant polisakarid C somatek ar pneumokok, alese e anv.
- protéine du choc thermique** ◇ **heat shock protein** ◇ **protein ar gwrezstroñsad** Protein enaozet da heul ur c'heuziad gwrezel, oloksigenel pe all, ouzh ar bevedeg.
- protéine kinase** ◇ **protein kinase** ◇ **protein kinaz** Enzim o treluskañ dazgwered treuzdoug ur bonad fosforil (PO_3^{2-} eus an adenzin trifosfat (ATP) war stroll hidrosil (–OH) digorvelloù kostezel an amindrenkennoù dezho ur soaz alkool, serin, treonin ha tirozin : $\text{protein-OH} + \text{ATP} \longrightarrow \text{protein-O-PO}_3^{2-} + \text{ADP}$).
- protéine S** ◇ **protein S** ◇ **protein S** Protein plasmatek enepkaouledus nes d'ar protein C hag a gresk ar gwered anezhañ. An divig ganedigel anezhañ, rouez, a c'hell devoudañ ur c'hleñved trombozenfraouek.
- protéine Z** ◇ **protein Z** ◇ **protein Z** Glikoprotein plasmatek e dalc'h ar vitamin K. Bevenaozet moarvat en avu, ar gwered bevedel anezhañ war ar c'haouledañ zo pell a vezañ anavezet mat evit c'hoazh.
- protéine tau** ◇ **tau protein** ◇ **protein τ** Unan eus proteinoù ar c'helligatel, aroustaler ar c'horribelloù. An dazadur anezhañ a zevoud an dic'henezhadur nervwianel arsellet e kleñved Alzheimer.

protéines G ◇ **G proteins** ◇ **proteinoù G** Proteinoù o c'hoarvezout eus teir isunvez (α , β , γ), etreat d'ar buzerioù kennennel hag d'ar reizhodoù dewerc'herioù, evel an enzimoù enkelligel hag an ionganoù. Kediañ a ra ar proteinoù kevreañ-se ouzh ar guanozin trifosfat (GTP), dourranet ganto e GDP. Reoù 'zo anezho a vlive pe a heud an adenilat-kiklaz. Blivaerioù (Gs) eo proteinoù G 'zo, ha heuderioù (Gi) reoù all.

protéinémie ◇ **proteinemia** ◇ **gwadvec'h g. protein, proteinwadvec'h** Bec'h ar proteinoù e plasma ar gwad, reol etre 70 ha 80 g/l. Ar proteinoù-se a c'hoarvez eus an albumin, ar globulinoù hag ar fibrinogen.

protéinogène ◇ **proteinogenous** ◇ **1 proteinbar aa. 2 proteinien aa.** 1 A zedaol proteinoù 2 O teverañ eus ar proteinoù.

protéinogramme ◇ **proteinogram** ◇ **proteinrestrad g.** Delun pe kevregad o terc'hennañ kenfeur pep hini eus ar proteinoù bezant en ul liñvenn vevel (gwad, liñvenn empenmelel, h.a.).

protéinorachie ◇ **cervicospinal fluid proteins** ◇ **keinvec'h g. protein, proteingeinvec'h** Bec'h ar proteinoù el liñvenn empenmelel (evit an albumingeinvec'h zo bec'h an albumin, tra ken). Ar werzhad reol anezhañ zo gavalet etre 0,20 ha 0,40 g/l.

protéinose ◇ **proteinosis** ◇ **proteinoz g.** Hogennadur kleñvedel proteinoù er gwiadoù.

protéinose lipoidique ◇ **lipoid proteinosis** ◇ **proteinoz lipoidel** Anez kroc'hen diwar ur migennevid a'n druzennoù, o naouiñ dre blakennoù arvelen en dro d'ar c'henvelloù ha dre un argerzh stirekaat sklerozus eus an dremm hag eus ar genoù.

protéinose pulmonaire alvéolaire ◇ **pulmonary alveolar proteinosis** ◇ **proteinoz skevent logigel** Skeventanaez dibaot, dianav e arbenn, o tedreiñ war-du fibroz ar skevent, o naouiñ dre hogennadur el logigoù eus un danvezenn c'hreunek eoizinofil a natur lipoprotek. Lies dedro zo : pe ar pare, pe an andizh da heul ur fibroz dieiltro.

protéinothérapie ◇ **proteinotherapy** ◇ **proteingurañ** Prederiadur dre ensinklañ proteinoù estren d'ar bevedeg, en amkan da zevoudañ erwezhoù fraouaat an difenn hangae enep ar poreoù. Un doare vaksingurañ anspesadel eo.

protéinurie ◇ **proteinuria** ◇ **1 troazhproteinegezh b. 2 troazhvec'h g. protein, proteindroazhvec'h g.** 1 Bezañ proteinoù en troazh 2 Feur ar proteinoù en troazh.

protéinurie glomérulaire ◇ **glomerular proteinuria** ◇ **troazhproteinegezh b. bloueigadel** Hanc'her o teanviñ an darn vrasañ eus troazhproteinegezhioù diwar al lounezhadoù bloueigel (ar bloueigadoù). Diuzel e c'hellont bezañ pa na vez nemet ar proteinoù plasmatek tolz mol izel o tremen en troazh, pe andiuzeal pa dremen en troazh hogos an holl broteinoù plasmatek.

protéinurie orthostatique ◇ **orthostatic proteinuria** ◇ **troazhproteinegezh b. warsavel** Bezañ proteinoù en troazh arsellet gant ar grennarded, devoudet pa dremenont eus al loadur a-c'hourvez d'al loadur war sav

protéinurie tubulaire ◇ **tubular proteinuria** ◇ **troazhproteinegezh pibelladel** Troazhproteinegezh o naouiñ dre vezañ globulinoù tolz mol izel, arsellet e pibelladoù 'zo.

protéique, protéinique ◇ **proteinic** ◇ **1 proteek aa., proteinek aa. 2 proteinel aa., proteek** 1 A natur gant ar proteinoù. 2 A-zave d'ar proteinoù.

NOTENN : heñvelster eo gl. *protéique* ha *proténique*, ha Br. *proteek* a c'hell bezañ desellet evel ur meztroc'h diwar *proteinek*. En un diarsell diouzh an erdal ne c'haller nemet ober gant *proteinel*, pe gant *proteek* desellet evel un amprest da neuze (sl. *protide, protidique*).

protéiprive ◇ **protein-free** ◇ **1 olproteinien aa. 2 olproteinel aa.** 1 Devoudet gant negez ar proteinoù. 2 A-geñver gant an negez proteinoù.

protéoglycane ◇ **proteoglycan** ◇ **proteoglukan g.** Polissakarid kevreet ouzh ar proteinoù bezant er gwiad kenglenel hag ar migorn.

protéolysat ◇ **proteolysate** ◇ **proteinloezad g.** Dedaolad ur proteinloezadur enzimel, diounezet en disvezhur.

protéolyse ◇ **proteolysis** ◇ **proteinloezañ** Dourrannadur ar proteinoù, trelusket gant enzimoù proteinloezus (proteazoù) a droc'h ar proteinoù e peptidoù hag ar peptidoù en amindrenkennoù.

protéolytique ◇ **proteolytic** ◇ **1 proteinloezat aa. 2 ~proteinloezañ, proteinloezus aa. 3 proteinloezadel aa.** 1 O tec'han proteinloezañ 2 en araez da zec'han proteinloezañ 3 A-zave d'ar proteinloezañ.

protéome ◇ **proteoma** ◇ **proteom g.** Hollad ar proteinoù bezant en ur bevedeg.

protéomique ◇ **proteomics** ◇ **proteomeg g.** Diskiblezh evodet eus ar genomeg o plediñ gant hennaderezh ha studi ar proteomou.

protéopexie ◇ **proteopexy** ◇ **proteinlenañ** Lenañ ar proteinoù er gwiadoù ; bevelaat ar proteinoù er bevedeg.

protéose ◇ **proteose** ◇ **proteoz g.** Nep aozad etrat d'an danvezennoù proteinek ha d'an amindrenkennoù.

proteus ◇ **proteus** ◇ **proteüz g.** Genad bakteri Gram leiel eus kerentiad an enterobakteriakeged, trigad kelanat boas ar c'hroc'hen hag ar glourgennoù.

prothèse ◇ **prosthesis** ◇ **1 osodouriezh b. 2 osod g., ersteudell b.** 1 Skourr eus ar yac'hadouriezh e bal amsaviñ, kevelañ, reizhañ diwar-bouez steudelloù (osodoù) un organ, un ezel, ur parzh korf en o arc'hwel ha / pe o neuz. 2 Nep pezh pe ardivink arveret en osodouriezh.

prothèse acoustique ◇ **hearing aid, hearing prosthesis** ◇ **klevosod g.** Ampliaer stenioù savet evit parraat ouzh ar bouzarderioù dec'havael.

prothèse dentaire ◇ **dental prosthesis** ◇ **1 dentosodouriezh b. 2 dentosod** 1 Kevrenn eus an dentouriezh, da bal dazluniañ an dent, amsaviñ ar re ziank, oberiañ steudelloù dentdremmel. 2 Steudell diloc'h (dentosod diloc'h) pe heloc'h (dentosod lamadus) outi un pe lies dant amsaviñ.

– Dentosod stabilaat (Gl. *prothèse de contention* Sz. *stabilization prosthesis, denture*) a reer eus ar steudell da ziloc'hekaat dent aet distrantell (gant ar parodontoz da skouer).

– Dentosod oufennek (Gl. *prothèse décollétée* Sz. *screw-cut prosthesis*) a reer eus ar steudell lamadus benet he flakenn sez e doare da lezel un esaouenn etrezi ha gouzoug an dent piaouel.

– Dentosod darnel, hollel, unel a reer eus un dentosod hervez ma amsav darn eus an dent, an holl zent eus ur wareg pe un dant hepken.

prothèse maxillofaciale ◇ **maxillofacial prosthesis** ◇ **osod dremm-aven, dremmosod g.** Osod dazluniañ an dremm ha / pe an div aven goude koll danvez. Steudell arveret da yac'haat an div aven goude daraez.

prothèse faciale ◇ **facial prosthesis** ◇ **dremmosod g.** Osod dazluniañ an dremm.

– Dremmosod diavaez (Gl. *prothèse faciale externe* Sz. *facial prosthesis*) a reer eus an osod dazluniañ goude kolloù danvez bras eus an dremm.

– Dremmosod engronnet pe surjiañel (Gl. *prothèse incluse* Sz. *surjical prosthesis*) a reer eus un osod enlakaet e-barzh ur wiadenn pe e sell an atelviñ pe e sell an azgouestaat arc'hwelel.

– Dremmosod stankañ (Gl. *prothèse obturatrice* Sz. *obturator prosthesis*) a reer eus an osod o tazluniañ speurennoù kavenn ar genoù goude ur c'holl danvez (hemañ o vezañ ar bouc'h fri-genoù, dazbid ar garvan, andlid gouel-stavn).

– Steudell denteeunañ (Gl. *prothèse orthodontique* Sz. *orthodontic prosthesis*) a reer eus an ardivink arloet ouzh ur wareg dent e pazenn an ergurañ, ar c'hurañ pe ar stabilaat.

prothèse oculaire ◇ **artificial eye** ◇ **lagadosod g.** Lagad kalvezadel.

prothésiste ◇ **prosthetist** ◇ **dentosodour g.** Kalvezour arbennikaet en oberierezh ar steudelloù dent diwar gemennadurioù an dentourion.

prothétique ◇ **prosthetic** ◇ **osodel aa.** A-zave d'an osod.

prothrombinase ◇ **prothrombinase** ◇ **protrombinaz g.** Tromboplastin blivaet, en araez da dreuzfurmiñ ar protrombin e trombin.

prothrombine ◇ **prothrombin** ◇ **protrombin g.** Globulin bezant er plasma a emdreuzfurm, dindan wered ar protrombinaz hag ar Ca²⁺, e trombin e-kerz an argerzh kaouledañ. Enaozet eo ar protrombin en avu e diraez ar vitamin K.

prothrombinémie ◇ **plasma prothrombin level, prothrombinaemia** ◇ **gwadvec'h g. protrombin, protrombinwadvec'h** Bec'h ar protrombin e plasma ar gwad. Pa zeu ar bec'h muzuliet dre amzer Quick da vezañ izeloc'h eget 25% eus ar werzhad reol (*protrombiniswadvec'h*) ez eo kaouledañ ar gwad dilerc'het kenan hag arvar gwadliñv zo. Ar protrombiniswadvec'h a c'hell bezañ ganedigal pe arzeuat (mienzaoz ar protrombin e-kerz ar c'hleñvedoù avu, anvitaminegezh K, euvradur ar vitaminKdolc'herioù).

prothrombique : complexe ~ ◇ **prothrombin complex** ◇ **kemplezh b. protrombek** Stroll globulinoù a gendaol, pa vezont kediet ouzh ar Ca²⁺ hag ouzh an tromboplastin, da furmiñ an trombin. Er stroll emañ ar protrombin, an akelerin, ar c'honvertin ha ar barenn Stuart.

protide ◇ **protein, protide** ◇ **protid g., protein g.** An termen *protid* a erdal an amindrenkennoù, ar peptidoù hag ar proteinoù. An amindrenkennoù — ugent anezho — zo kedrannoù diazez ar proteinoù hag ar peptidoù.

protiréline ◇ **protirelin** ◇ **protirelin g.** Keveler kevanaozel an TRH (elloerenn vorc'hañ an tireostimulin, TRF).

protiste ◇ **protist** ◇ **protist g. -ed** O teanviñ garvevion, unkellig peurliesañ, eus ar riezadoù plantel ha loenel. Isrannet eo ar protisted e daou stroll : an eukarioted (fêlu, foue ha protozoed) hag ar prokarioted (bakteri).

protocole de soins infirmiers ◇ **nursing protocole** ◇ **komenad g. arouelioù klañvdiour** Deskrivadur an treugennadurioù klañvdiour da embreger evit plediñ gant ur blegenn gleñvedel roet.

protodiastole ◇ **protodiastole** ◇ **deroù-diastol g.** Kentañ lankad diastaol ar galon.

protodiastolique ◇ **protodiastolic** ◇ **deroù-diastol aa.** A-zave lankad kentañ an diastol kofigel, war-lerc'h digoridigezh an trapigou kentez-kofig.

protomastigote ◇ **protomastigote** ◇ **protomastigot g.** Pazenn eus emdrogor ar flagelleged (leishmania, trypanosoma), hirvoan, outo ur skourjezig araok, hep lienenn neuennus avat.

proton ◇ **proton** ◇ **proton s. & g.** Rannig elfenn muivec'hiet, kedrann — a-ser gant an neutron — an derc'hanoù. Niverenn atom un elfenn zo par da niver ar proton endalc'het en derc'han.

protoneurone ◇ **protoneuron** ◇ **protoneuron g.** Neuron, kentañ elfenn gelligel oc'h amparañ un rehent nervel.

protonthérapie ◇ **proton radiation therapy** ◇ **protongurañ** Skingurañ o tedalvout ar proton c'hwimmet.

proto-oncogène ◇ **proto-oncogene** ◇ **proto-onkogen g.** Genenn en araez d'embreuzfurmiñ en onkogen, dre zargenañ .

protophyte ◇ **protophyte** ◇ **profit g.** Bevedeg plantel unkellig.

protoplasme ◇ **protoplasm** ◇ **protoplasm** g. Danvezenn parzhiat er c'helligoù, liñvel pe liñveloc'h he c'hantalc'h, kolloidel he luniad ha kemplezh meurbet he c'henaoc kimiek. Enni ez eus ur c'hementad bras a zour, korfoù bevel ha halioù anvevel war zileizh pe en arlung ennañ. Ar protoplasm a c'hoarvez eus ar c'hitoplasm hag eus ar graoñell.

protoplaste ◇ **protoplast** ◇ **protoplast** g. Bakterienn kollet he speurenn ganti, dindan wered danvezennoù diseurt (penikillin, lizozim).

protoporphyrine érythropoïétique ◇ **erythropoietic protoporphyria** ◇ **protoporfiriazh** b. **ruzparien** Anaev kennevidel hêrezhel treuzkaset war ar mod aotozomek trec'hek, devoudet gant un hogennadur protoporfirin en eritrokitoù diwar divig uroporfirinogen III sintaz. Erzerc'hañ a ra ent klinikel dre ul linadell heolel.

protoporphyrine ◇ **protoporphyrin** ◇ **protoporfirin** g. An hini pouezusañ eus ar porfirinoù naturel, o tasperzhiañ — kediet ouzh an houarn hag ouzh ur protein — en amparidigezh an hemoglobin hag ar mioglobin.

protosystole ◇ **protosystole** ◇ **deroù-sistol** g. Kentañ lankad sistol ar galon.

protosystolique ◇ **protosystolic** ◇ **deroù-sistol** aa. O c'hoarvezout e lankad kentañ ar sistol kofigel.

prototrophe ◇ **prototrophic** ◇ **prototrof** aa. A-zivout ur garvev a zo e ezhommoù mezhuere an hevelep re ha skodoù orinel ar spesad.

prototype ◇ **prototype** ◇ **arc'hrizh** g. Er vevrummouriezh, rizh kezivik, orinel.

protovertèbre ◇ **protovertebra** ◇ **arc'hmel** g. (sl. *métamère, somite*).

provirus ◇ **provirus** ◇ **provirus** g. Elfenn hilel heloc'h a c'hell gougevaniñ ouzh an dafar hilel ha devoudañ dargenadoù ennañ.

protoxyde d'azote ◇ **nitrous oxide** ◇ **protoksidenn** b. **nitrogen** Aezhenn N₂O arveret en dieraezouriezh.

protozoaires ◇ **protozoa** ◇ **protozed** l., **protozoenn** u. Skourrad ar riezad loenel ennañ bevion unkellig, gouest da loc'hañ e-doug ur prantad hir pe hiroc'h eus o hoali, diwar-bouez mardroadoù, skourjezigoù pe blevanoù kreniat. Erdalañ a ra : ar rizopod, ar flagelleged, ar sporozed hag an infuzor.

protozoologie ◇ **protozoology** ◇ **protozooniezh** b. Rann eus al loenoniezh o studiañ ar protozed.

protozoophage ◇ **protozoophage** ◇ **protozoofag** g. Kellig a fagokit ar protozed.

protozoose ◇ **protozoois** ◇ **protozooz** g. Kleñved devoudet gant ar protozed.

protraction ◇ **protraction** ◇ **erdennañ** Dastum, kas war raok un organ, ent dibarek an teod pe ar c'haved.

protrusion ◇ **protrusion** ◇ **raktourzhadur** g. Stad anreol un organ pe ur parzh organ o valirañ war raok dre un arbenn kleñvedel.

protrusion acétabulaire ◇ **intrapelvique protrusion** ◇ **raktourzhadur** g. **bodennel** Pukadur deun ar bodenn, a valir el lestr. An disneuziad-se a zevoud harzegadur fiñvoù ar c'henvell.

protubérantiels : syndromes ~ ◇ **pontine syndromes** ◇ **azoniadoù pontel** Azoniadoù devoudet gant tizhad ar pont, eleze parzh kef an empenn loet a-us d'an hirvel, a-is d'an troadoù empenn ha dirak an ilpenn. C'hoarvezout a reont atav, en tu kevenep d'an anaf, eus ul ledseizi, kevret a-wechoù gant strafuilhoù ar santout. Ul ledazoniad ilpennel, ur seizi eus nervenn an dremm, eus nervenn loc'hañ diavaez al lagad pe eus nervenn loc'hañ al lagad a c'hell sezañ a-gendu d'al ledseizi pe a-gendu d'an anaf, o tisoc'h dre-se gant ul ledseizi dastuat. Hervez sez an anaf e teskriver : an azoniadoù pontel araok, diwar tizhad rannbarzh kofel pe troadel ar pont, eleze an azoniadoù Millard-Gubler, Brissaud-Sicard hag ur seizi gaouhirvelel pontel; azoniadoù ar c'hil pont diwar tizhad rannbarzh a-gein ar pont. An azoniadoù lec'hiek-se a vez yoc'hennien ar peurliesañ. Ar boukadurioù diwar tizhad gwazhiedel a erzerc'h dre un azoniadur strewecoc'h : an azoniad lezkreizer naouus dre ul ledseizi a-eiltu o vont buan dasstrizhek, loet a-wechoù en ezel krec'h, aliesoc'h avat naouus dre un treuz- pe ur pevarseizi diwar tizhad daoudu; pe c'hoazh, rouesoc'h, naouus dre ul ledazoniad ilpennel, kevredet a-wechoù gant un tizhad eus an nervenn drigevell pe eus nervenn an dremm, gant bouzarded pe gant un azoniad Claude Bernard-Homer.

Proust : signe de ~ ◇ **Douglas's cry** ◇ **aruez Proust** (sl. *cri ou signe du Douglas*).

providencia ◇ **providencia** ◇ **providencia** Genad bakteri eus ar c'herentiad enterobakteriakeged a c'hell bezañ kiriek eus poreadoù troazhadel ha flugezel.

provirus ◇ **provirus** ◇ **provirus** g. Tammad trenkennoù nukleek viruzel gougevanet ouzh genom ur gellig ha treuzkaset gantañ da-geñver emrannadur ar gellig.

provitamine ◇ **provitamin** ◇ **provitamin** g. Diaraoger ur vitamin, evel da skouer ar c'haroten evit ar vitamin A hag ar sterolou evit ar vitamin D.

provocation : test de ~ ◇ **provocative test** ◇ **proud an devoudañ** Hentenn deznaouiñ a c'hell addec'han azonoù an allergiezh, o devoudañ, a se an anv roet dezhi. *Proud an adebarzhiñ a vez graet anezhi ivez.*

proxémique ◇ **proxemics** ◇ **kefineg** g. Diskiblezh o plediñ gant ar c'heñverioù a gefinded hag a belled etre an hinienn ha pezh zo en dro dezhañ.

proximal ◇ **proximal** ◇ **nezek** aa. A zo an tostañ ouzh ar c'hreiz pe ouzh al linenn greizer (eus ar c'horf pe eus un organ). Kontrol da *pellet*.

proximologie ◇ **amvaoniezh** b. Studi amva ar gouziviad.

PrP ◇ **prion protein**, **PrP** ◇ **PrP** Protein arsellet en empenn e-doug an empennaouedoù goulemm spouevanek. Daou seurtad zo : unan reol, ar *PrP-c* (“c” evit Sz. *cellular*) hag unan ardarzhel, ar *PrP-Sc* (“Sc” evit Sz. *scrapie*) a zo ur protein amiloidel ezreol; diforc’h int dre o harzusted ouzh gwered ar proteazoù. Evit gwir e vez graet ivez *PrPsens* (“sens” evit Sz. *sensitive*, eleze *hedizh* d’ar proteazoù) eus ar *PrP-c* ha *PrPres* (“res” evit Sz. *resistant*, eleze *anhedizh* d’ar proteazoù) eus ar *PrP-Sc*.

prurigène ◇ **pruriginous** ◇ **debroneiat** aa. A zevoud an debron.

prurigineux ◇ **pruriginous** ◇ **1 debronek** aa. **2 debronus** aa. 1 Gant debron. 2 A zevoud debron.

prurigo ◇ **prurigo** ◇ **prurigo** g. Anv genadel kroc’henadoù diseurt o naoùñ dreist holl dre un debron feuls hag anafoù krugennek, krac’hennoù arzu warno peurliesañ, diwar ar c’hliadennoù devoudet gant ar c’hravat.

prurigo de Hebra ◇ **Hebra’s prurigo** ◇ **prurigo** g. **Hebra** Prurigo o teraouiñ er bugelvezh hag o parañ da vare ar gaezour-egzh.

prurigo gestationis ou **prurigo gravidique** ◇ **prurigo gestationis**, **prurigo of pregnancy** ◇ **prurigo** g. **ar vec’hiegi** Kroc’h-enad debronus kenan, naoous dre grugennoù bihan sezet dreist holl war an daouarn, war an treid ha war ar c’hein, oc’h anadiñ gant ar vaouez vrazez war-dro pevare miz ar vec’hiegi.

prurigo nodulaire de Hyde ◇ **nodular prurigo** ◇ **prurigo** g. **nozelek Hyde** Prurigo naoous dre nodadur nozelennoù kroc’h-enel liesel, kevredet gant un debron garv tre (sl. *lichen*).

prurigo simplex chronique ou **vulgaire** ◇ **neurodermatitis** ◇ **prurigo** g. **eeun henek pe boutin** Seurtad prurigo naoous dre un debron feuls ha kravat, o tisoc’h gant ul linadell, un eritem ha goude gant likenekadurioù muiiek kevret gant burbuennoù ha livegadoù, un ekzema ha kliadennoù. Padout a ra an dermatoz-se bloavezhioù. Ar prurigo eeun henek a c’hell bezañ strewek (likenekaat strewek, debron hennadek strewek Brocq ha Jacquet) pe kantet (plakenn likenekaat, liken eeun henek Vidal, debron hennadek henek kantet Brocq ha Jacquet).

prurit ◇ **pruritus** ◇ **debron** g. Santad a grafign e par ar c’hroc’hen o tevoudañ ar c’hoant da skrabañ.

prurit sénile ◇ **senile pruritus** ◇ **debron kozhiadel** Debron o tarvezout gant an hennadeg, e dalc’h ar c’hroc’henisteñv o wazhañ er gozhni ar peurliesañ.

PSA ◇ **prostate specific antigen** ◇ **antigen spesadel ar raksavenn**, **ASR** (sl. *antigène prostatique spécifique*).

psammocarcinome ◇ **psammocarcinoma** ◇ **psammokarkinom** g. Kankr, razekadurioù ennañ.

psammome ◇ **psammoma** ◇ **psammom** g. Yoc’henn, enni razekadurioù heñvel ouzh traezh.

psellisme ◇ **psellism** ◇ **gagerezh** g. (sl. *bégaiement*).

pseudacousie ◇ **pseudacousis** ◇ **gaouglev** g. Santad dangorel eus daralladur ar stenioù.

pseudarthrose ◇ **pseudarthrosis** ◇ **gaougenvell** g. Kenvell gaou, kleñvedel, nevezfurmet etre an daou damm eus un askorn bet torret hag ankevandiñvet.

pseudesthésie ◇ **pseudesthesia** ◇ **brizheraez** g. Merzhout div eraezadenn gevarall dec’hanet gant fraouadur un organ skiant-enel, evel al livglev pe ar c’hwezghwel.

pseudo-achondroplasia ou **dysplasie pseudo-achondroplasiaque** ◇ **pseudoachondroplasia**, **PSACH**, **pseudo-achondroplastic dysplasia** ◇ **gaouvigornangwe** g. pe **miwe gaouvigornangweek** Korred e dalc’h ur c’hleñved hiliien genezhel a’n askorn.

pseudo-actinomycose ◇ **pseudoactinomycosis** ◇ **gaouaktinomikoz** g. Kleñved granulomatus a denn e azoniadur da hini an aktinomikoz, devoudet gant foue ha n’eo ket gant aktinomiket.

pseudo-albuminurie ◇ **pseudoalbuminuria** ◇ **gaoudroazhalbuminegezh** b. Troazhalbuminegezh o tarvezout hep nep lounezhad.

pseudo-anémie ◇ **pseudo-anemia** ◇ **gaouamwad** g. Gwelved an amwiskadoù hep amwad. An doare paotañ zo ar gaouamwad gwazhiedandagel (Gl. *pseudo-anémie angiospastique*), eilvedel d’ar gwazhiedstrishaat.

pseudo-asthme ◇ **pseudoasthma** ◇ **astmavan** g. Trec’hwez astmaheñvel kalonien, andarwalladel avat (sl. *asthme cardiaque*).

pseudo-athétose ◇ **pseudoathetosis** ◇ **gaouatetoz** g. Kren ar bizied o tarvezout pa astenn ar gouziviad e vrec’h gant daoulagad serr, arsellet e degouezh tabez ha skleroz strollet.

pseudobulbaire ◇ **pseudobulbar** ◇ **gaouhirvelel** aa. (sl. *paralyse pseudo-bulbaire*).

pseudocholéra de Stanton ◇ **cholericform melioidosis** ◇ **koleravan** g. **Stanton** Furm glinikel a velioidoz naoous dre un darc’hoal puilh hag un दौरisvec’h muiiek.

pseudocartilage ◇ **pseudocartilage** ◇ **migornvan** g. Gwiad migornvanek.

pseudochorée ◇ **pseudochorea** ◇ **korevan** g. Stad a zigenurzh dispislec’h kevredet gant azonou korevanek, eleze heñvel ouzh re ar c’horea.

pseudochromesthésie ◇ **pseudochromesthesia** ◇ **livglev** g. (sl. *audition colorée*).

- pseudochromhidrose** ◇ **pseudochromhidrosis** ◇ **gaouc'hwezlivegezh** b. Livrezh blev an divgazel dre berzh danvezennoù borc'het er c'hwez gant bakteri 'zo.
- pseudocitricas stellaires spontanées** ◇ **stellate spontaneous pseudoscars** ◇ **gaougleizennoù** l. **steredenn em-darzh** Anvet ivez *kleñved Colomb* (Gl. *maladie de Colomb*), gaougleizennoù Colomb zo kleizennoù rozwenn, hirvoan pe steredennek, o tinodiñ a-emdarzh war gein an daouarn ha war dalbenn kein an divarvec'h. N'int ket dianlen d'un daraez, met disoc'h daralladurioù an derm, moarvat.
- pseudocirrhose péricardique** ◇ **pericarditic pseudocirrhosis of the liver** ◇ **gaougirroz** g. **amgalonennien** Seurtad avu kalonien diwar an amgalonennfo amwaskus arsellet gant an oadour, o naouiñ dre ensiladur er parenkim eus naskoù stirek o tont eus stirsaë ardev an avu.
- pseudocoarctation de l'aorte** ◇ **pseudocoarctation of the aorta** ◇ **kilwe** g. **an aortenn** (sl. *aorte plicaturée*).
- pseudocroup** ◇ **pseudocroup** ◇ **gaougroug** g. (sl. *laryngite striduleuse*).
- pseudodiphthérie d'Epstein** ◇ **pseudodiphtheria** ◇ **gaouzifieriezh** b. **Epstein** Gorank gant furmadur brizhlienennoù nad int ket dec'hanet gant *Corynebacterium diphtheriae*.
- pseudo-énarthrose** ◇ **pseudoenarthrosis** ◇ **gaouenartroz** g. Doare gaougenvell stirirgennel heñvel ouzh ur c'henvell boullek.
- pseudoexophorie** ◇ **pseudoexophoria** ◇ **gaouezwilc'hañ** Ankensteud ezwar enkelat diwar un direizhad eus ar c'hreizennoù argeidañ.
- pseudogène** ◇ **pseudogene** ◇ **gaouc'henenn** u., s. : **gaouc'hen** Kemalad DNA anerc'her heñvel bras ouzh ur c'henenn weredek, deveret diouti dre zizoublañ, dargenañ pe kildreuzskrivañ.
- pseudogliome** ◇ **pseudoglioma** ◇ **gaouc'hliom** g. Naouez diwar danijenn a 'r c'horf gwerek, a denn d'ur gliom a 'l luc'hsae.
- pseudoglobuline** ◇ **pseudoglobulin** ◇ **pseudoglobulin** g. E kemm diouzh an euglobulin ez eo ar pseudoglobulin hezileizh en dour pur hag en dileizhennoù dourhalel tanav.
- pseudographie** ◇ **pseudographia** ◇ **darallskriv** g. Skrivañ arouezioù digomprenadus, kevatal skrivet an darallgomz.
- pseudogueusie** ◇ **pseudoguesia** ◇ **gaoudañva** g. Blazeraeziñ dangorel hep kentrigen diavaez.
- pseudo-hématocèle** ◇ **pseudohaematocele** ◇ **gaouwadvozhell** b. Gwadvozhell ec'hampellennel pe endan-ampellenn-lestr.
- pseudo-hémophilie** ◇ **pseudohemophilia** ◇ **gaouhemofiliezh** b. (sl. *Willebrand : maladie de von* ~).
- pseudo-hémoptyisie** ◇ **pseudohemoptysis** ◇ **gaouwadskopad** g. Skrouediad gwad na zeu ket eus ar skevent pe eus ar bronkez.
- pseudo-hermaphrodisme** ◇ **pseudohermaphrodisim** ◇ **gaouerevegezh** b. Stad naouus dre ar genvezañs en un hinienn eus gwagrennoù revel ur rev hag eus organoù ganadel diavaez pe eus eilarouezioù revel rizhek ar rev all.
- pseudo-hermaphrodisme féminin** ◇ **female pseudohermaphrodisim** ◇ **gaouerevegezh venevel** (sl. *gynandrie, gynanthropie*).
- pseudo-hermaphrodisme masculin** ◇ **male pseudohermaphrodisim** ◇ **gaouerevegezh c'hourevel** Stad o naouiñ ur gourev gaouerevek kelgellek, gant arouezioù revel diavaez neuzeit ent venevek (sl. *androgynie*).
- pseudo-hermaphrodite** ◇ **pseudohermaphrodite** ◇ **1 gaouerevek** aa. **2 gaouereveg** g. **-eion** 1 A-zivout un hinienn tizhet gant ar c'haouerevegezh. 2 Hinienn c'haouerevek.
- pseudo-hydronéphrose** ◇ **pseudohydronephrosis** ◇ **gaoulounezhfoeñv** g. Kist trolounezhel.
- pseudo-hyperaldostéronisme** ◇ **pseudohyperaldosteronism** ◇ **gaouuc'haldosteroegezh** b. Anaez ganedigel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek naouus dre un ankizidigezh eus ar pibelloù lounezh ouzh an aldosteron.
- pseudo-hyperkaliémie** ◇ **pseudohyperkalemia** ◇ **gaougaliomwadusvec'h** g. Daraozad imboure'hva : kresk bec'h ar c'haliom er gwadvez hag er plasma dre zilaosk kaliom etrekelligel a-benn un nebeut eurvezhioù war-lerc'h an erlamad gwad.
- pseudo-hypertension artérielle** ◇ **pseudohypertension** ◇ **gaouuswak** g. **talmerel** (sl. *Osler : manœuvre d'*~).
- pseudo-hypertrophie** ◇ **pseudohypertrophy** ◇ **gaouusteñv** g. Reñver ec'honad un organ e dalc'h un uswe eus ar gwriad kenglenel pe behinel, hep usteñv e wiad spesadek.
- pseudo-hypertrophique de Duchenne** : **type** ~ (sl. *paralyse ou myopathie pseudohypertrophique type Duchenne, maladie de Duchenne*).
- pseudo-hypoaldostéronisme** ◇ **pseudohypoaldosteronism** ◇ **gaouisaldosteroegezh** b. Anaez ganedigel, familhel a-wechoù, ha neuze treuzkaset hogos bewech er mod aotozomek trec'hek o erzerc'haat gant ar vagadell dre un natriomadavad lounezhel muiek, daoust d'un diouladur aldosteron uhel. An orin anezhi a ve ankizidigezh ar c'helligoù pibell pellek ouzh an hormon-se.
- pseudo-ictère** ◇ **pseudoicterus** ◇ **gaouikter** g. Livrezh melen ar c'hroc'hen nad eo ket diwar livegennoù bestl.
- pseudo-isochromatique** ◇ **pseudoisochromatic** ◇ **damheñvelliv** aa. A-zivout an taolennoù amkanet da imboure'hiñ gwel al livioù, warno daou liv hewel evit al lagad bonan, tra ma ne laka al lagad anvonan kemm ebet etrezo.

pseudo-Klinefelter : syndrome de ~ ◇ **pseudo-Klinefelter's syndrome** ◇ **gaouazoniad g. Klinefelter** Azoniad a denn da hini Klinefelter diouzh ar savboentoù klinikel, bevoniel ha gwiaodiel (koulskoude, ezvezant e vez ar venevvronnegezh ar peurliesañ ha nebutoc'h erzerc'h an dizogvanegezh); hogen n'eus ennañ gwariadenn gromozomel ebet : XY eo ar c'hariotip ha gourevel eo ar rev c'henrizhel.

pseudokyste ◇ **pseudocyst** ◇ **gaougist g.** Kavenn o tennañ d'ur c'hist, hep speur piaouel avat.

pseudokyste pancréatique ◇ **pancreatic pseudocyst** ◇ **gaougist ilgreizel** Hogennadur sug ilgreiz en tachad drek-ampelenn diwar varvennadur ha rogadur ur san ilgreiz.

pseudolèpre (de Robles) ◇ **Robles' disease** ◇ **gaoulovezh b. Robles** Anaez arsellet e Guatemala, naouus dre anafoù henek elefantiazek an treid o tennañ d'al lovezh, diwar an onkokerkoz avat.

pseudoleucémie infantile infectieuse ◇ **infantile visceral leishmaniasis** ◇ **gaouleukemiezh b. poreel ar vugale** (sl. *kala-azar infantile, anémie splénique infectieuse*).

pseudolipome ◇ **pseudolipoma** ◇ **gaoulipom g.** Tolzenn vehin ankantet dindan ar c'hroc'hen, loet ar peuliesañ er poull us-trebez leuniet ganti; plezhad ar vrec'h hag ar gwazhied a c'hell bezañ amwasket ganti. Ar peurliesañ e vez kemparzhed ar gaoulipomou.

pseudomélanose ◇ **pseudomelanosis** ◇ **gaouvelanoz g.** Livrezh goude marv ar gwiaoù gant livegennoù diwar ar gwad.

pseudomembrane ◇ **pseudomembrane** ◇ **brizhlienenn b.** Naouezenn fibrinek pe fibrinoleukokitel, gouzedet e rezh draillh-ennoù fetis war c'horre ur glaourgenn pe ul levgenn tanijennek.

pseudomembraneux ◇ **pseudomembranous** ◇ **brizhliennek aa., tonennek aa.** O naouiñ dre furmadur naouezennoù dezho neuz lienennoù.

pseudo-Ménière ◇ **pseudovertigo** ◇ **gaoudrolern g. Ménière** pe **trolern menervanek** Azoniad milendallel o tennañ da azoniad Ménière, hep an holl elfennoù anezhañ avat (sl. *Ménière : maladie pe syndrome de ~*).

pseudoméningite ◇ **pseudomeningitis** ◇ **gaoubilhonfo g.** (sl. *méningisme*).

Pseudomonas ◇ **Pseudomonas** ◇ **Pseudomonas g.** Genad bakteri eus kerentiad ar *Pseudomonadaceae*, anezho bazhellou Gram lei, heloc'h, aerat pe anaerat anret, kimivevdeñvek, paot kenan er priadoù hag en dourioù. Analadel eo o c'hennevid. Kleñvedus eo spesadoù 'zo evit an den hag al loened.

Pseudomonas aeruginosa ◇ **Pseudomonas aeruginosa** ◇ **Pseudomonas aeruginosa g.** Spesad *Pseudomonas* kleñvedus, kiriek eus linadurioù glas arwer (piokianin, pioverdin) hag ivez eus poreadoù ospitalel grevus, dreist holl evit ar glañvourion vliadet hag amzifenn.

pseudomycétome ◇ **pseudomycetoma** ◇ **gaouviketom g.** Koeñvenn foel heñvel ent klinikel ouzh ar miketom hag ouzh ar paramiketom, enni na greun, nag edañvennoù mikeliom, na korfoù eozinofil (anafoù tredel 'zo eus ar pian, angiokeratomoù 'zo, anafoù 'zo eus ar c'hroc'hen pe eus an eskern).

pseudomyopathique : syndrome ~ ◇ **pseudomyopathic syndrome** ◇ **azoniad g. gaougahernaouedel** Teskad azonoù oc'h erwereañ ur c'hahernaoued (isteñv kaherel gourizoù an izili krec'h ha traoñ hag ivez gwrizienn an izili) arsellet e liesnerv-ennofoioù poreel 'zo hag el liesgwriziennfoioù. Kemm zo etrezañ hag ar c'hahernaoued dre e zinod herrek kenan, bezañ strafuilhoù an eraeziñ, steuz an damougoù a-stirenn ha dre un dedro argizus en un nebeut mizvezhioù.

pseudomyotonie ◇ **pseudomyotonia** ◇ **gaouviotoniezh b.** Anaez diforc'h diouzh ar viotoniezh, rak gorrekaet eo ken an arlaoskiñ ken an argrezañ kaherel. Arsellet e vez er skorted skoedennel.

pseudomyxome péritonéal ◇ **pseudomyxoma peritonei** ◇ **gaouviksom g. ampelennel** Nevezfurmad kaotek dinodet en ampelenn, eilvedel da freg ur c'hlaourvohell divilhennel pe da freg ur c'hist vierrez a rizh glaourgennanek.

pseudoneuralgie ◇ **pseudoneuralgia** ◇ **gaounervost b.** Laur o c'hoarvezout war dreug ur barr pe ur c'hef nerval evel un nervost, disheñvel diouti avat dre ezvezañ ar poentoù laurus naouus. Ar gaounervostoù a c'hoarvez e dianlen amwask ar gwriziennoù a-livenn : erzerc'haat a reont e-doug droug Pott, kankr ar mellkein, o tiaraogiñ ar peurliesañ arouezioù amwask ar mel a-livenn.

pseudonévrome d'attrition ◇ **false neuroma, pseudoneuroma** ◇ **neurom g. taravadel** Tevadur stirek ur c'hef nerval diwar ur gloazad, damheñvel ouzh un neurom.

pseudonystagmus ◇ **pseudonystagmus** ◇ **gaounistagmuz g.** Teskad azonoù heñvel ouzh re an nistagmuz, hep ar fiñvoù korvezek reoliek anezhañ avat.

pseudopararis ◇ **Osler's node** ◇ **gaouveskoul g.** (sl. *Osler : nodule d'~*).

pseudoparalysie ◇ **pseudoparalysis** ◇ **gaouseizi g.** Koll hañvalat an nerzh kaherel (sl. *Parrot : pseudoparalysie ou maladie de ~*).

pseudoparasitisme ◇ **pseudoparasitism** ◇ **gaouarvadezh b.** Arvadezh dre zarvoud, dibad (sl. *parasitisme*).

pseudopelade (de Brocq) ◇ **pseudopelade, cicatricial alopecia** ◇ **gaoubeliad (Brocq)** (sl. *Brocq : pseudopelade de ~, état pseudopéladique*).

pseudopeste aviaire ◇ **newcastle disease** ◇ **gaouosenn b. evnel** (sl. *Newcastle : maladie de ~*).

pseudophakie ◇ **pseudophakia** ◇ **adferennañ, ferennesteudañ** Amsaviñ ar ferenn naturel gant ur ferenn galvezadel, un *adferenn*.

pseudophaque ◇ **pseudophakial** ◇ **1 adferennek** aa. **2 adferenneg** g. -eion **3 adferennel** aa. 1 A-zivout ul lagad gant un adferenn pe an den gant un pe div adferenn. 2 Gouziviad adferennek. 3 A-zave d'an adferenn.

pseudophaquie ◇ **pseudophakia** ◇ **adferennegezh** b. Stad ul lagad oberataet diouzh ar ferennlug hag o tougenn un adferenn.

pseudophénomène du genou ◇ **gaouanadenn b. ar glin** E degouezhioù 'zo a steuz an damougoù a-stirenn, gant treuzseizidi pergen, kiziata stagell ar padellek, en ur vroudañ kroc'hen ar rannbarzh, a c'hell devoudañ ur fiñv damougek anvet *damoug difenn*, gorrekoc'h ha padekoc'h eget an damoug a-stirenn hag ouzhpenn se oc'h emledañ da lies stroll kigennoù.

pseudoploïde ◇ **pseudoploid** ◇ **pseudoploïdel** A-zivout ur gellig dezhi un niver reel a gromozomou (46 gant an den), unan pe meur a hini anezho o vezañ bet azluniet.

pseudopode ◇ **pseudopod** ◇ **mardroad** g. -dreid Astenn protoplasm ardeuzat ur gellig heloc'h (amoeb, leukokit), a dalvez da emzilec'hiñ.

pseudopolyarthrite rhizomélisque ◇ **polymyalgia rheumatica, Certonciny's syndrome** ◇ **gaouliesarzo** g. **ezelwri-adel** Aneaz an henaded o wazhañ kenvelloù an divskoaz hag an divlez gant daralladur a 'r stad hollek, gwrester hag ustizh gouzediñ. Kevredet e vez alies gant an dalmerennfo ividig. An dedro emdarzh pe dre ar c'hortikoidoù a ya etrezek ar pare.

pseudopolydystrophie de Hurler ◇ **pseudo-Hurler syndrome** ◇ **gaouazoniad** g. **Hurler** pe **gaouliesmideñ** g. **Hurler** Aneaz nes da gleñved Hurler ha renket e-kichen ar mukopolisakaridozioù, e-touez ar mukolipidozioù, hogen diforc'h diouto dre an deroù nebeutoc'h kenrat anezhañ (war-dro 4 pe 5 bloaz), dre ur gorred vuiek, dre drec'hded kammneuziadoù an eskern war ar c'haf (hep rakwar dargreiz), dre neuz skinlun an eskern, dre zinod diwezhat ha dre c'hougelled an disleberadur bred, dre an ezvezañs a zireolderioù gwadel ha dreist holl dre ezvezañs a ziouladur kleñvedel a vukopolisakaridoù trenkek.

pseudoporencéphalie ◇ **pseudoporencephaly** ◇ **gaouempenngleuzennegezh** Anaf empenn heñvel ouzh an empenngleuzennegezh, naouus dre ur pukad sezet war ar bluskenn empenn, na gehent ket gant ar c'hambrou, anezhañ ur furmadur kistek kleuzet er bilhonenn dev. E gavout a reer en diodezh, evel en empenngleuzennegezh wir.

pseudo-pseudo-hypoparathyroidisme ◇ **pseudopseudohypoparathyroidism** ◇ **gaou-gaouarskoedisvorc'hegezh** b. Kleñved heñvel ouzh ar gaouarskoedisvorc'h, hep direzhioù an amc'hwil fosfor-kalkiom (sl. *ostéodystrophie héréditaire d'Albright*).

pseudoptosis ◇ **pseudoptosis** ◇ **gaouvalvennlink** g. Neuz ar malvennoù o tennañ da hini an islink, diwar strizhded faoutoù ar malvennoù avat.

pseudorachitisme ◇ **pseudorickets** ◇ **gaoulec'h** g. Nep askornvideñv heñvel ouzh al lec'h gwir, hep keñver gant un negez vitamin D avat, evel, da skouer, an askornadoù eilvedel d'ul lounezhad.

pseudoréaction ◇ **pseudoreaction** ◇ **gaouerwezh** g. Erwezh faos pe touellus; erwezh kroc'hen ouzh ur prouad entonennel nad eo ket devoudet gant ar proteinoù spesadel endalc'het en angevezh arveret, met gant proteinoù anspesadel.

pseudorhumatisme infectieux ◇ **pseudorheumatism** ◇ **gaouremm** g. **poreel** Argerzhioù poreel sezet e-kefin ar c'henvelloù, lestel ar peurliesañ, nes da remm lemm an arzoù.

pseudosarcome fibromateux ◇ **pseudosarcomatous fibromatosis** ◇ **gaousarkom** g. **fibromatus** Argerzh gaouyoc'hennel o tizhout an oadour yaouank, sezet peurliesañ war an divarvrec'h, naouus dre furmadur un ozvenn endan-groc'hen sonn, glenet ouzh an talennoù don, o tiorren en un nebeut sizhunvezhioù evit tizhout un treuzkiz a 4-5 cm. Ouzh ar c'horrgresker ez arseller un neridigezh fibroblast doues pe zouesoc'h, nec'hus e gaou pa gaver enno mitozioù niverus, anrizhek avat, hag ivez korrwazhied bihan hag ur stroma miksoïd alies. Argizañ a ra an anaf rouez kenan hag an dilemel surjanel zo ar prederiadur eus an dibab. ar g. f. a vez graet ivez *faskiennfo ozvennel* (Gl. *fasciite nodulaire*) anezhañ.

pseudosclérodémie à éosinophiles ◇ **eosinophilic fasciitis, Shulman syndrome, diffuse fasciitis with eosinophilia** ◇ **gaoukleroderma** g. **gant eozinofil** Azoniad sklerodermavanek emrenek a c'hell amparañ mod deraouiñ ur skleroderma reizhiad pe ur skleroderma riblennek, pe a c'hell bezañ arsellet e-doug kenglennoùedoù all. Naouiñ a ra dre un tizhad foel hag ensiladek, strewek pe strewekoc'h, eus ar c'houdonenn (anvet gwechall *faskienn endan-groc'hen*) hag eus ar faskienn gaherel, hebiat d'ar c'higennoù danlec'hiet ha d'ar c'hroc'hen, kevredet en degouezhioù paoñtañ gant ur gwadeleozinofil muiek, o tedeñ war hir amzer, a-wechoù e-doug meur a vloavezh.

Arsellet e vez an naoued-se gant an oadour pergen, evit an div rev en un doare kevatal mui pe vui. Kregiñ a ra alies war-lerc'h ur strivad korfel taer ha hirbad, o souriñ en izili ent kemparzh, o erzerc'hañ dre goevadur laurus an tachadoù tizhet hag o tevoudañ un andrafted arc'hwelc' amgement a 'r c'henvelloù nes da dizhadoù ar faskienn; rouez eo an tizhadoù kevredet a 'r flugez; e hogos 10% eus an degouezhioù e vez arsellet tizhadoù gwadel grevus ent galloudel (melangwe, olpladanou, amwad loezadel). En div drederenn eus an degouezhioù, koulz lavarout, ez eus un eleozinofil a c'hell mont betek 30%. A-wechoù ez eo diaes an deznao gant ar skleroderma reizhiad, ha ne vez dervaet nemet dre ur bevsvav e bloc'h war ar c'hroc'hen, war ar gwriad kelligaouek endan-groc'hen, war ar faskienn gaherel hag ar gigen danlec'hiet. Lakaat a ra war wel ur skleroz a'n derm oc'h emastenn d'ar gwriad behinel endan-groc'hen ha d'ar faskiennou kaherel a zo tevaet, o tont da vezañ sez un ensiladur limfoplasmokitel, histiokitel hag eozinofil, enno a-wechoù daspugnadoù immunoglobulinou IgG ha kedrannoù klokaenn C3. Diazezet eo ar mezegadur war ar c'haengurañ hollek, daoust ma c'hell c'hoarvezout didorroù emdarzh (sl. *Shulman : syndrome de ~*).

pseudosclérose ou **p. en plaques de Westphal-Strümpell** ou **syndrome cérébello-strié** ◇ **Strümpell-Westphal pseudosclerose** ◇ **gauskleroz** g. pe **gauskleroz strewek Westphal-Strümpell** pe **azoniad ilpennrizenegel** Anaez dibaot kenan, heñvel ouzh ar skleroz strewek hag a zo anezhañ un askenad eus an *dic'henezadur avuferegel*, naouus *ent klinikel* dre ur c'hrenerezh diarvennel, un deluzañ skoataet ha dre vezañs ur walenn staenek war wrimenn ar gornsae (trogornsaeenn Kayser-Fleischer); *ent neuziadurel* dre anafoù korrgreskere eus ar bluskenn ilpenn hag eus kangrennoù an diazpen, o c'hoarvezout eus un dedaol anreol a neuroglia ha dre ur c'hirroz isteñvek ha nozelek, hep erzerc'had klinikel (sl. *hépatite familiale juvénile avec dégénérescence du corps strié, maladie de Wilson*).

pseudosmie ou **pseudo-osmie** ◇ **pseudosmia** ◇ **gaouc'hwesh** g. Strafuilh ar c'hwesh a o c'hoarvezout a zec'havaelañ ur c'hwez hep kenrigad ebet (sl. *dysosmie*).

pseudoscarlatine ◇ **pseudoscarlatina** ◇ **gaouskarlegenn** b. Stad terzhiennel a-ser gant un dispuilhad heñvel ouzh hini ar skarlegenn, diwar ur pistriadir avat.

pseudosomation ◇ ◇ **gaouarzeuadeg** b. Rummad dibarek a argemmadoù disheñvel diouzh an dargenadoù emdarzh, pa c'hoarvez ar re se hep arbenn anat pe anavezet, tra ma hañval ar g. bezañ e dalc'h eeun parennoù alvezel fizikel pe gimiek. daskemmadur ar germen kevaraezus d'an treuzkas hêrezhel a 'n doareenn nevez a c'hoarvez e dianlen ur c'henn e luniad ar soma.

pseudosclèreme ◇ **pseudosclerema** ◇ **gausklerem** g. Behinvarvenn endan-groc'hen ar vagadell.

pseudotabès ◇ **pseudotabes** ◇ **gaoudabez** g. Azoniad ankedreel kevredet peurliesañ gant strafuilhoù ar mabloc'hañ, heñvel ouzh an tabez kein a orin sifilitek, hag a zo devoudet gant un tizhad a 'r gwiennnoù santout mielinek. Kavet e vez el liesnervennfoioù (diabetek, alkoolek) pe e tizhadoù e pañsoù adreñv ar mel a-livenn (azoniad nervanwadel).

pseudotétanos ◇ **pseudotétanus** ◇ **gaoudetanz** g. Argrezadoù padek ar c'higennoù, heñvel ouzh re an tetanoz, hogen n'int ket devoudet gant *Clostridium tetani*.

pseudotalidomide : syndrome ~ ◇ **pseudotalidomide syndrome** ◇ **azoniad g. talidomidvanek** Teskad kammneuziadoù nes da azoniad Roberts gant an hevelep tizhadoù ouzh an izili (krakezelegezh Gl. *phocomélie* anvet ivez darnezelegezh Gl. *méromélie*), met gant distresadoù dremm skañvoc'h : hemangiom, iswe eskell ar fri, blev melen ha rouez.

pseudotuberculose ◇ **pseudotuberculosis** ◇ **gaouorzhellegezh** b. Anvad roet da deskad an anaezioù heñvel ouzh an dorzhellegezh diouzh ar savboent neuzkleñvedel pe glinikel, daoust ma n'int ket devoudet gant bazheloù antrenkennharz, evel *Pasteurella pseudotuberculosis*.

pseudo-tumeur cérébrale ◇ **pseudotumor cerebri** ◇ **gaouyoc'henn empenn** Anaez anvet ivez *uswask enklopennel* (Gl. *hypertension intracrânienne*) pe *gouliñv hennadek ar vegenn* (Gl. *œdème papillaire idiopathique*) diwar gresk ar gwask e gwazhied an empenn. Seurt gwask enklopennel zo dezhañ lies arbenn : resmiadoù uswask talmerel garv, orc'had empenn gant gwadliñv, argerzh empennel war zeled (yoc'henn, gwatoñv, pugnez), poreadoù (pilhonfo, empennfo), empennfoeñv. Lies erzerc'had zo : klopennadoù a-ser gant c'hweladoù, strafuilhoù lagadel a c'hell mont betek an dallentez. An dedro, buan pe buanoc'h hervez an arbenn, a ya etrezek tuzumadur ar meiz, strafuilhoù ar realezh, ar goabrennegezh, ar c'homa zoken, o tarallañ arc'hwelioù bevet an amred hag an analañ (sl. *hypertension intracrânienne : syndrome de l'~*).

pseudothypoméningite des porchers ◇ **leptospirose meningitis** ◇ **pilhonfo** g. **gaouidifoidel** Poread diwar *Leptospira pomona* — anvet ivez *leptospirose ar voc'herion* pe *kleñved ar voc'herion yaouank* —, treuzkaset eus ar moc'h d'an denion, oc'h erzerc'hañ da gentañ dre azonoù heñvel ouzh re un derzhienn difoidel dezhi un deroù trumm, heuliet gant ur mutvezh berr ha war-lerc'h gant un azoniad pilhonet nad a ket ouzhpenn 48 eurvezh. Dedreñ a ra etrezek ar pare hogos bewech (sl. *porchers : maladie des jeunes* ~).

pseudovirus ◇ **pseudovirus** ◇ **pseudovirus** g. Hanc'her kinniget evit deanviñ daou seurtad gwezherioù pore kevarall d'ar viruzoù, anezho molekul proteek, ar viroidoù hag ar prionoù.

pseudoxanthome élastique ◇ **pseudoxanthoma elasticum** ◇ **pseudoksantom** g. **dastennel** Kroc'henad dibaot, naouus dre nozelennoù distroll pe daskantus o tevaat ar c'hroc'hen hag ouzh e liveañ e melen. An anaf gwiael zo un dic'henezhadur a 'r gwiennnoù dastennek ha kollagen, paotoc'h war dal kostezel ar gouzoug, an divgazel, plegoù an daouilin ha poullou an daouarzell (sl. *élastorrhéxie*).

psilocybine ◇ **psilocybine** ◇ **psilokibin** g. Alkaloid bezant e foue 'zo (*Psilocybe mexicana*), a zevoud an euvriñ anezho trezerc'hadoù (sl. *narcotinién ou psilocybién : syndrome* ~).

psilose ◇ **psilosis** ◇ **diwaoutad** g. (sl. *alopécie*).

psittacisme ◇ **psittacism** ◇ **perokediñ** Strafuilh an ezluzañ gant arreata frazennoù anveizet.

psittacose ◇ **psittacosis** ◇ **psitakoz** g. Pore ar Psitakideged (perokeded, krakperokeded) treuzkasadus d'an den, devoudet gant *Chlamydia psittaci*. Naouus eo dre ur stad wrestere hag ensilennoù skevent. Azoù eo an ervezh ouzh diounezadur an tetrakiklineier.

psaos ◇ **psaos** ◇ **kigenn** b. **a-loan bras** Kigenn eus parzh araok ar vorzhed oc'h amparañ gant ar kigenn a-glun ar kigenn loan-klun.

psaos-iliaque (muscle) ◇ **psaos-iliac muscle** ◇ **kigenn** b. **loan-klun** Kigenn amparet gant ar c'higennoù a-loan hag a-glun.

psodyme ◇ **psodymus** ◇ **psodim** g. Euzheg daouat a zo kempet an daou gef anezhañ e rannbarzh al loan ha dispartiet uheloc'h. N'eus nemet div c'har hag a-wechoù krakelfenn un drede.

psôitis ◇ **psoitis** ◇ **psoitis** g. Tanijennadur ar gigenn a-loan o tevoudañ ul lakadur rizhek a 'r vorzhed war blegañ, pellaat ha c'hwelañ.

psoralène ◇ **psoralen** ◇ **psoralen** g. -où Anv genadel ur stroll kedrannoù plantenoù 'zo (*Ammi majus*, *Psoralea corylifolia*). Arver danvezenoù (porfumoù, liaoù) enno psoralenoù a c'hell devoudañ kroc'henfoioù luc'hbistriel pa vez en ardizh an heol. Ar PDMAgurañ a c'hoarvez eus arver ar psoralenoù a-ser gant skinoù dreistmouk (sl. *photochimiothérapie*, *thérapie photodynamique*).

psorentérie ◇ **psorenteria** ◇ **psorenteri** b. Anaf glaourgenn ar pervez e-doug ar c'holera hag an tifold, gant koll ar bodenoù ha neuz balirek devoudet gant koeñvadur ar bolc'henoù kloz.

psoriasisforme ◇ **psoriasisform** ◇ **psoriazizvanek** aa. Heñvel ouzh ar psoriaziz.

psoriasis ◇ **psoriasis** ◇ **psoriaziz** g. Kroc'henad eritemgourc'hennus dianav e arbenn, henek e zedro, naouus dre blakennoù ruz hevonn, warno gourc'henoù gwenn. Sezet e vez an anafoù dreist holl war an daoulin, an daoulin, ar vrigenn, a-wechoù war ar c'horf a-bezh avat. Menegomp ar *p. arzadel* (Gl. *p. arthropathique*, sl. *rhumatisme psoriasique*); ar *p. inveterata*, doare psoriaziz ma 'z eo an anafoù tev kenan ha likenkaet; ar *p. diac'hin* (Gl. *p. interverti*, Sz. *inverse psoriasis*, ma 'z eoezet an anafoù war ar c'hrizadoù plegañ, war balvou an daouarn hag a-wechoù war sol an treid, a-c'hin d'ar furmoù boas; ar *p. burbuennek hollek Zumbusch* (sl. *Zumbusch : syndrome de ~*); ar *p. c'hwarrennek* (Gl. *p. scrofuloux*).

psorospermie ◇ **psorospermia** ◇ **psorospermi** s. Anvad roet da gokidi 'zo. Ur seurtad *p. viheñvel* zo bet deskrivet gant an den e kelligoù eus kleñved Paget beg ar vronn, eus ar *molluscum contagiosum* (akne vrec'hvanek) hag eus epiteliomoù a-c'horre 'zo. Darbenn a reer ar peurliesañ ned eo ar furmadurioù enkelligel-se — kammgereret evit un arvevad — nemet ebarzhennoù protoplasm.

psorospermose ◇ **psorospermiosis** ◇ **psorospermioz** g. Kleñved devoudet gant ar psorospermi.

psorospermose folliculaire végétante ◇ **Darier's disease** ◇ **psorospermioz** g. **bolc'henn** **struzhennek** (sl. *Darier : maladie de ~*).

PSP : épreuve de la ~ ◇ ◇ **prouad** g. an **FSF**, **prouad ar fenolsulfonftalein** Prouad ar fenolsulfonftalein.

PSPH : Participant au Service Public Hospitalier ◇ ◇ **perzhiad e gwazerezh foran an ospitalioù** A-zave da ospitalioù prevez 'zo.

psychalgie ◇ **psychalgia** ◇ **brednervost** b. Seurtad nervost nemedennek, ma sour an elfenn a orin vredel.

psychanalyse ◇ **psychoanalysis** ◇ **bredelfennerezh** g.

Freud e unan a roas un niver termenadurioù d'ar bredelfennerezh. Unan eus ar re fraeshañ eo an hini a gaver e-barzh an *Encyclopédie* e 1922 : “bredelfennerezh zo anv : 1° un araezad da imboure'hiñ argerzhioù bred dreistdiraez pe dost a hent all; 2° un hentenn diazezet war an imboure'herezh-se evit prederiañ direizhoù neurozel; 3° ur steudad veizadurioù bredoniezhel savelet en doare-se o kreskiñ war un dro hag oc'h amparañ tamm ha tamm un diskiblezh nevez eus ar ouezoniezh.” Diskiblezh diazezet gant Freud, a c'haller termenañ diouzh tri live : a) Un hentenn imboure'h evit lakaat war wel talvoudegezh diemouez ar c'homzoù, an oberoù, an derc'hadoù (hunvreoù, eriuñelloù, ambrenoù). Embreg e vez an dieulerezh bredelfennadel war dedaolad ar strollata frank, hogen ivez war gendere'hadoù diseurt. b) Un hentenn vredkurañ deveret eus an imboure'h-se, dezhi da amkan dieulañ an harzder, an treuzdoug, an eriuñañ. c) Un teskad arlakadennoù bredoniezh ha bredkleñvedouriezh oc'h ober meiz war an devoudoù savelet dre an imboure'hiñ hag ar prederiañ bredelfennadel.

Freud e unan a roas un niver termenadurioù d'ar bredelfennerezh. Unan eus ar re fraeshañ eo an hini a gaver e-barzh an *Encyclopédie* e 1922 : “bredelfennerezh zo anv : 1° un araezad da imboure'hiñ argerzhioù bred dreistdiraez pe dost a hent all; 2° un hentenn diazezet war an imboure'herezh-se evit prederiañ direizhoù neurozel; 3° ur steudad veizadurioù bredoniezhel savelet en doare-se o kreskiñ war un dro hag oc'h amparañ tamm ha tamm un diskiblezh nevez eus ar ouezoniezh.”

psychanalyste ◇ **psychoanalyst** ◇ **bredelfenner** g. Arbennigour engwiriet da embreg ar bredelfennerezh.

psychanopsie ◇ **psychanopsia** ◇ **bredangwel** Dallder a orin bredel.

psychasthénie ◇ **psychasthenia** ◇ **psikasteniez** b. Neuroz deskrivet gant P. Janet, naouus dre un enkreiz kleñvedel, un amzivin, un daskiriadur soñjoù, kantaezadoù a ziwerc'helezh hag a zistreünin en degouezhioù grevusañ. Mezeion 'zo, evel Dubois a ginnig an termen-se e-lec'h an hini a *neurastheniez*, en arbenn eus roll gourfouezus ar bred en ardazh ar stadoù neurastenek.

psychédélique ◇ **psychedelic** ◇ **1 psikedelek** aa. **2 psikedeleg** g. 1 A-zivout ar stadoù bred dezho ur muiadur hag un daralladur eus an eraeziñ, trezerc'hadoù ha un daskemmadur eus an noa (gourboz pe gouvid). Boaziet e vez an termen-se evit an anadennoù bred devoudet gant drammoù trezerc'heiat 'zo (LSD, meskalin, h.a.) ha da heul evit ar greadoù sevenet en ur stad eus ar seurt. 2 Dre astenn ster e talvez ivez evit an drammoù a zevoud ar gweredoù-se, evel da skouer *dietilamid an drenkenn lizergek* pe *N,N-dietillizergamid*, anvet ivez *lizergid*.

psychiatre ◇ **psychiatrist** ◇ **bredvezeg** g. -eion Mezeg arbennikaet er vredvezekniezh.

psychiatrie ◇ **psychiatriy** ◇ **bredvezekniezh** b. Skourr ar vezekniezh a bled gant ar bredanaezioù hag ar strafuilhoù bred.

psychiatrie infantile ◇ **child psychiatry** ◇ **mabvredvezekniezh** b. Skourr ar vredvezekniezh o plediñ gant ar vugale, adalek ar c'hanedigezh betek ar mont tre en oadouriezh. *Mabvredvezeg* a vez graet eus embregourion an kez diskiblezh, a erdal studi, deznaou, kur hag ergur ar strafuilhoù bred o tizhout ar vugale. Liammoù strizh zo enta gant bredoniezh an diorreadur ha bredvezekniezh an oadourion.

psychiatrie médico-légale ◇ **forensic psychiatry** ◇ **lezennvredvezekniezh** b. Skourr ar vredvezekniezh o plediñ gant arvezioù lezennel ar bredanaez.

psychique ◇ **psychic** ◇ **~bred, bredel** aa. A-zave d'ar bred.

psychisme ◇ **psyche** ◇ **1 bredadur g. 2 bred g. 3 bredelezh** b. 1 Teskad an doareoù dibarek eus bred un den. 2 Teskad, emouez pe diemouez, desellet a-bezh pe a-zarn, eus an anadennoù, an argerzhioù o tennañ d'ar c'hefred, d'ar meiz, d'ar gantaezelezh oc'h amparañ buhez ar spered. 3 A-gevenep d'ar greudelezh emañ ar vredelezh, kement a sell ouzh anadennoù ar bred.

psycho-analeptique ◇ **psychostimulant, psychoanaleptic** ◇ **1 bredusreer aa. 2 bredusreer g.** 1 O kontraouiñ ar bred-arc'hwelañ. 2 Nep lia dezhañ ar perzh-se (an *amfetamin* da skouer), en o zouez an usdefraouerioù hag an noausreerioù, oc'h amparañ ur rann eus ar bredwezherioù.

psycho-anémique : **syndrome** ~ ◇ ◇ **1 bredusreer aa. 2 bredusreer g.** Kevreted amwad Biermer ha strafuilhoù bred : kefroù pe c'houvid, dibaotoc'h stadoù lemm a vroudedigezh, ambren — paranoiak pergen —, arluz, gouvid melankolek.

psychobiologie ◇ **psychobiology** ◇ **bredvevoniezh** b. Studi ar vredelezh diouzh savboent ar vevoniezh, dreist holl evit a sell an darempredoù etre an hinienn gant e amva.

psychochirurgie ◇ **psychosurgery** ◇ **breddsirjianerezh** g. Surjianerezh an empenn amkanet da barraat ouzh strafuilhoù bredel 'zo, pe dre lemel an arbennoù anezho (yoc'henn empenn, anaf diandaraez), pe dre zilemel parzhioù 'zo a 'r bluskenn, evel an dolbennezvenañ talel (sl. *lobectomy*).

psychodépendance ◇ **drug addiction, drug dependence** ◇ **bredestoue g.** Hoalerezh an dramm war ar c'haezhiad o kemer furn un ezhomm kreñv pe greñvoc'h anezhañ, koulskoude hep azonoù kreudel. Evit deveradoù an termen-mañ, sl. *dépendance*.

psychodiagnostic ◇ **psychodiagnosis** ◇ **breddeznaouiñ** Teskad emzivizoù ha prouadoù bredel amkanet da anavezout a-zon personelezh ur gouzviad pe da andalañ ar c'henniñvoù pe ar strafuilhoù bredel a c'hoarvez gantañ.

psychodrame ◇ **psychodrama** ◇ **psikodrama** g. Hentenn deznaouiñ ha bredkurañ naouk dre zezerc'hadur c'hoarivael pleg-ennoù gwerc'hel pe faltaziet gant ar c'houzviaded.

psychodynamique ◇ **psychodynamics** ◇ **bredluskoniezh** b. Studi an argerzhioù bred.

psychodysléptique ◇ **psychodysléptic** ◇ **1 bredvireüs aa., bredvireer aa. 2 bredvireer g. -ioù** 1 A zevoud strafuilhoù bred, bredkleñvedus. 2 Danvezenn vredvireüs, bredwezher o werediñ war ar stad emouezañ, trezerc'heiat (evel an LSD pe ar meskalin, da skouer). Ar *b.* a vez arveret er vredvezekniezh da erzerc'haat personelezh ar c'hlañvour ha resizañ orin ar strafuilhoù bred.

psycho-embryopathie ◇ ◇ **bredrizhellnaoued g., bredrizhellanaez g.** Rizhellanaez dezhañ un erzerc'had bredel.

psychogalvanomètre ◇ **psychogalvanometer** ◇ **psikogalvanometr g.** Galvanometr o lerc'hwezañ an argemmoù tredan-harzed eus ar c'hroc'hen e-doug stadoù bredel ha nervstruzhel 'zo.

psychogène ◇ **psychogenic** ◇ **bredien** aa. A zo a orin bredel, a-gevenep da *kreudien*.

psychogénèse ◇ **psychogenesis** ◇ **1 bredtarzh g. 2 bredtarzhouriezh b.** 1 Diorreadur an arc'hwelioù bredel. 2 Arlakadenn orin vredel ar strafuilhoù bred.

psychogériatrie ◇ **psychogeriatrics** ◇ **bredhenadouriezh** b. Studi kudennoù bredel ha bredvezegel an henaded klañv.

psychogérontologie ◇ **psychogerontology** ◇ **bredhenadoniezh** b. Bredoniezh an henaded.

psychogramme ◇ **psychogram** ◇ **bredrestrad g.** Derc'hennadur gouluniek pe kevregat disoc'hoù an imbourc'h bredandal-erezhel.

psychographique : **trouble** ~ ◇ **psychographic** ◇ **strafuilh g. bredmiskrivel** Daralladur ar skrivañ devoudet gant ur bredanaez : ankounac'haat ur ger, adanv amoet, fazi reizhskrivadur bras, razadur, h.a.

psycholepsie ◇ **psycholepsy** ◇ **bredfell g.** Leiadur trumm an tennder bredel.

psycholéptique ◇ **psycholeptic** ◇ **1 bredisreeüs aa., bredisreer aa. 2 bredisreer g.** 1 En araez da leiaat an oberiezh vred, eleze izeladur an defroù, leiaadur an oberiezh kefredel, izeladur an tennder fromel. 2 Nep lia bredisreüs, en o zouez an hunwezherioù, an nervisreerioù hag an dienkrezerioù.

psychologie ◇ **psychology** ◇ **1 bredoniezh b. 2 bredouriezh b.** 1 Diskiblezh o studiañ monedigezh, bredadur (gant an argerzhioù anezhañ) ar gouzrec'h bonan. 2 Dedalvezadur an diskiblezh er pleustr.

psychologie analytique ◇ **analitic psychology** ◇ **bredoniezh elfennadel** Elfennadur ar bred diouzh ergrafoù Jung. E kemm diouzh Freud, an hentenn elfennadel a savel deznaou ha prederiadur an neurozioù diwar andaladur miazasadur an ampoent, ha n'eo ket evel Freud diwar studi ar c'hemplezhioù a-gozh.

psychologie clinique ◇ **clinical psychology** ◇ **bredouriezh klinikel** Dedalvezadur an anaoudegezhioù bredoniel damkanel ha kalvezel evit deznaou ha prederiadur ar c'hleñvedoù bred.

- psychologie criminelle** ◇ **criminal psychology** ◇ **bredoniezh koulel** Studi vredoniel bred, luskedoù ha realoù ar goulerion.
- psychologue** ◇ **psychologist** ◇ **1 bredoniour g. 2 bredour g.** 1 Arbennigour ar vredoniezh. 2 Embregour ar vredouriezh.
- psychométrie** ◇ **psychometry** ◇ **bredandalerezh g.** Teskad ar prouadoù dedalvezet da andañ gouested ar meiz hag arc'hwel ar bred, dreist holl andaladur niverel an naoudezh hag an arc'hwelioù benvegel.
- psychomoteur** ◇ **psychomotor** ◇ **bredloc'hadel aa.** A-zave d'ar gweredoù loc'hadel e dalc'h d'an oberiezh vred.
- psychomotricien** ◇ ◇ **bredloc'hadour g.** Eiler mezegel diplomet, engwiriet da erounit greadoù micherel a addiorren bredloc'hadel.
- psychomotricité** ◇ **psychomotricity** ◇ **bredloc'hadelezh b.** Teskad an arc'hwelioù loc'hañ gouevanet ouzh an oberiezh vred hag azasaet ouzh ezhommoù ar c'hemoned.
- psychonévrose** ◇ **psychoneurosis** ◇ **psikoneuroz g., neuropsikoz g.** Termen arveret gant Freud evit doareañ, a-gevenep d'an neurozioù bremanek, ar bredanaezioù a zo o azonoù an eztaol argele eus kenniñvoù ar bugelvezh, eleze an neurozioù treuzdoug hag an neurozioù narkisek. Hiziv ez eo bet dilezet an arver er ster freudek eus an termenoù psikoneuroz ha neuropsikoz. Aozerion 'zo a venn ober gant psikoneuroz da arouezñ neurozioù grevus o wiskañ neuzioù 'zo eus ar psikoz.
- psychonosologie** ◇ **psychonosology** ◇ **psikonozologiezh b.** Rummata ar bredanaezioù.
- psycho-oncologie** ◇ **psychoncology** ◇ **bredkankrouiezh b., kankrvredouriezh b.** Bredouriezh dedalvezet d'ar c'hankrou.
- psychopathe** ◇ **psychopath** ◇ **1 bredklañvour g. -ion 2 psikopat g. -ed** 1 Gouziviad ur c'hleñved bred. 2 Hinienn tizhet gant ar psikopatiezh.
- psychopathie** ◇ **psychopathia** ◇ **1 bredkleñved g. 2 psikopatiezh b.** 1 Termen hollek o teanviñ nep kleñved bred. 2 Strafuilh bred naouus dre un diouer a reolerezh eus ar fromadennoù hag eus al luzadoù, un darluskegezh, ur skorted a azasadur ouzh ar reoladoù divazel pe kevredadel, un diskevredadelezh, un tuadur d'an darvezhiañ ha d'ar realañ enepkevredat.
- psychopathique** ◇ **psychopathic** ◇ **1 bredkleñvedel aa. 2 psikopatek aa.** 1 A-zave d'ur bredkleñved. 2 Gant doareoù ur psikopatiezh.
- psychopathogène** ◇ ◇ **bredkleñvedus aa.** A zevoud strafuilhoù bred (sl. *psychodysleptique*).
- psychopathologie** ◇ **psychopathology** ◇ **bredkleñvedouriezh b.** Diskiblezh o studiañ ar bredkleñvedoù a c'hell bezañ anvet *bredoniezh kleñvedel ivez*.
- psychopharmacologie** ◇ **psychopharmacology** ◇ **bredliaoniezh b.** Skourr al liaoniezh o plediñ gant gwered al liaoù war an argerzhioù bred, a c'hell bezañ anvet *liavredoniezh* (sl. *pharmacopsychologie*).
- psychopharmacologique : agent** ~ ◇ **psychopharmacological drug** ◇ **bredwezher g.** Gwezher arveret e prederiadur ar strafuilhoù bred.
- psychophysiology** ou **psychophysique** ◇ **psychophysiology** or **psychophysics** ◇ **bredvevedouriezh b.** Studi vevedel an argerzhioù bred.
- psychoplasticité** ◇ ◇ **bredhezelv g., bredhezelvusted b.** Tuadur da erzerc'haat azonoù kreudel dindan delanvad derc'hadoù.
- psychoplogie** ◇ **psychoplegia** ◇ **bredfallaenn b.** Barrad ezaouiñ hag ankoun (koll darnel pe hollek ar c'hounerezh) trumm ha berbad diwar un tizhad gwazhiedel eilvedel d'an arterioskleroz, moarvat.
- psychoprophylaxie** ◇ **psychoprophylaxis** ◇ **brederaaz g.** Erazañ bred un hinienn e doare m'en devo erwezhoù azas hag eus ar gwellañ evit ar bevedeg, en amveziadoù 'zo, peurgetket evit ur vaouez da-geñver ar gwilioud.
- psychose** ◇ **psychosis** ◇ **psikoz g.** Termen hollek o taveiñ d'ar strafuilhoù bred dezho un arbennelezh vredel pe vevedel, naouus dre un direizhadur don eus ar bersonelezh, dre un disleberadur eus an dezvarn hag eus ar poellata, dre duzumidigezh ar meiz, dre vennozioù ha steuñvadurioù ambreek ha lies gwech dre strafuilhoù eus ar merzhout skiantennel (trezerc'hioù).
- psychose alcoolique** ◇ **alcoholic psychosis** ◇ **psikoz alkoolel** Psikoz diwar an alkoolegezh o c'hoarvezout, etre traoù all, eus azoniad Korsakoff hag eus an alfo alkoolel lemm (sl. *délire alcoolique aigu, delirium tremens*).
- psychose carcérale** ◇ **prison psychosis** ◇ **psikoz karc'harel** Strafuilhòù bred a-geñver gant karc'haridigezh hiniennoù bonan o bred, a rizh gant ar gouvid hag an arluzegezh.
- psychose délirante aiguë ou subaiguë** ◇ **acute delusional disorder** ◇ **psikoz ambreek lemm pe goulemm** Dindan an termen-se e voder : ar gaouad ambren lemm ; psikoziou ambreek an dianwilioud ; ar resmiadoù ambren e deroù ur psikoz henek (skizofreniezh).
- psychose hallucinatoire chronique** ◇ **persecution complex** ◇ **psikoz trezerc'hadel henek** Psikoz naouus dre zvevezadurioù ambreek, a rizh gant mennozioù heskinadur ha trezerc'hioù (sl. *idées de persécution*).
- psychose infantile** ◇ **infantile psychosis** ◇ **psikoz mabanel** Termen oc'h engronnañ ar psikoziou kentrat o dinodadur er bugelvezh.
- psychose maniacodépressive** ou **psychose maniaque-dépressive** ◇ **maniac depressive psychosis** ◇ **psikoz maniakel-gouvidel** Psikoz ma c'hoarvez un heuliad a resmiadoù mania, a-bep-eil gant resmiadoù melankoliezh, etrezo entremezioù reoliek ma ren ur stabiled vredel bennak.

psychose puerpérale ◇ **puerperal psychosis** ◇ **psikoz eskorvezhel** Teskad ar strafuilhoù psikozel o tarvezout e-doug ar vec'hiegi, ar gwilioud pe an dianwilioud.

psychose réactionnelle ◇ **brief reactive psychosis** ◇ **psikoz erwezhiat** Psikoz delanket gant ur stroñs fromel.

psychose sénile ◇ **senile psychosis** ◇ **psikoz kozhiadel** Psikoz o tarvezout gant an henaded, alies diwar daralladurioù empenn bevedel.

psychosensoriel ◇ **psychosensorial** ◇ **bredskiantennel** aa. A-zave d'ar galloudezhioù kefredel ha d'an oberiezh vredel e dalc'h ar merzhout skiantennel.

psychosexuel ◇ **psychosexual** ◇ **bredrevel** aa. A-zave d'an ampar bredel pe fromel eus ar bondoug revel.

psychosomatique ◇ **psychosomatic** ◇ **bredkreudel** aa. A-zave da zelanvad ar bred war ar bevedeg.

psychotechnique ◇ **psychotechnics** ◇ **bredkalvezerezh** g. Teskad ar c'halvezderioù hag ar prouadoù amkanet da zinoñ gouestedoù ha barregezhioù un hinienn e sell d'e heñchañ war-du un obererezh pe ur vicher azas.

psychothérapie ◇ **psychotherapy** ◇ **bredkurañ** A) Ent ledan, nep hentenn da brederiañ an direizhoù bred pe kreud o vont dre araezioù bredel pe, resisoc'h, o tennañ splot eus an darempred etre kurer ha klañvour : an teogiñ, ar goudreñ, an azgouestaat bred, an darboellañ, h.a. Er ster-se, ar bredelfennañ zo ur furm eus ar bredkurañ. B) Strishoc'h, e keveneb ar bredelfennerezh ouzh furmoù all ar bredkurezh, dre veur a abeg : pa 'z eo ar bredelfennerezh dreist pep tra diulerezh ar c'henniñv diemouez, elfennadur an treuzdoug o vezañ an hent d'e ziskoulmañ.

NOTENN : Ouzhpenn *bredkurezh* g. hag an deveradoù boas e c'haller, evit arouezñ un embregadenn vredkurañ, arverañ *bredkur b.*, *bredkuradem*. Ar *bredkurer* (Gl. *psychothérapeute*; Al. *Psychotherapeut*; Sz. *psychotherapist*) eo an hini a ren ar vredkur; ar *bredkuradour* ar gouzviad; *bredkuradel* (Gl. *psychothérapie*; Al. *psychotherapeutisch*; Sz. *psychotherapeutic*) eo pezh a denn d'ar bredkurañ.

psychothérapie analytique ◇ **analytic psychotherapy** ◇ **bredkurañ elfennadel** Furm a vredkurezh o harpañ war bennaennoù damkanel ha kalvezel ar bredelfennerezh hep gwiskañ koulskoude doareoù ar gur elfennadel rik.

psychothérapie comportementale ◇ **behaviour psychotherapy** ◇ **bredkurañ ersavadel** Bredkurañ diazezet war an ersavouriezh, dezhañ da amkan ezvevnañ an azonoù ha daskemmañ boazioù anazas ar realañ dre araezioù darblegañ da dizarblegañ.

psychothérapie d'accompagnement ◇ **supportive psychotherapy** ◇ **bredkurañ ambroug** Bredkurañ a denn da startaat gwikefreoù difenn ar gouzviad ha da leiaat an enkrezh hag an azonoù.

psychotique ◇ **psychotic** ◇ **1 psikozel** aa. **2 psikozek** aa. **3 psikozeg** g. 1 A-zave d'ar psikoz. 2 Tizhet gant ar psikoz. 3 Klañvour psikozek.

psychotonique ◇ **psychotonic** ◇ **bredfraouaer** g. Lia o fraouaat an oberiezh empenn, dre grouiñ ar peurliesañ ur stad a hevred. E stroll ar bredfraouerioù emañ an amfetaminoù, dreist holl (sl. *psychostimulant*).

psychotrope ◇ **psychotropic** ◇ **bredwezher** g. -ioù Nep danvezenn en araez da zaskemmañ ar vonedigezh vredel. Ar *b.* a vez rummataet e tri stroll : ar bredisreieroù (hunwezherioù, nervisreieroù, dienkrezerioù), ar bredusreieroù (enepgouvidegoù, bredfraouerioù) hag ar bredvireerioù (trezerc'heiadou).

psychrophile ◇ **psychrophilic** ◇ **yengar** aa. A-zivout ar bakteri dezho un diorreadur gwellek en ur gavael etre 15 hag 20°C.

PTA ◇ **plasma thromboplastin antecedent** ◇ **PTA, diaraoger an tromboplastin plasmatek** Parenn XI, diaraoger an tromboplastin plasmatek.

PTA test ◇ **peroxydase treponemal Antibody** ◇ **proud PTA** Erwezhiad hangael evit deznaouiñ ar sifiliz, dre arverañ an treponem gwelw lazhet. Tielladur an antiglobulinou a vez dewerc'het bennozh d'un enzym, ar peroksidaz.

ptériorion ◇ **ptériorion** ◇ **ptériorion** g. Er c'hlopennvuzulierezh, poent e soutadur an eskern tal, ividig, kitem hag askell vras ar genneg.

ptériorique : **acide** ~◇ **ptérioric acid** ◇ **trenkenn b. pteroek** Trenkenn kedrann e kenaoz an drenkenn folek.

ptéroylglutamique : **acide** ~◇ **ptéroylglutamique acid** ◇ **trenkenn b. pteroilglutamek** Vitamin ar stroll B, deverad naturel gougevanet e stroll kimiek ar pteridinoù. Ar furm eeunañ eus an aozadoù-se zo an drenkenn pteroilmonoglutamek. Deveradoù direet 'zo, evel an drenkenn dezhydropteroilglutamek hag an drenkenn detrahydropteroilglutamek, a wered evel koenzimoù e lies dazgwered bevenaozañ. An kek trenkenn zo ret da enaoz an eritrokitoù hag al leukokitoù. He c'havout a reer en avu, el lounezhi, el leguminedeg, er goell, en ed, el legumaj glas, h.a. (sl. *acide folique*).

ptérygion ◇ **pterygium** ◇ **kilgen** g. Tevadur tric'hornek ar gevresae, e ziaz durc'haet war-du korn al lagad, e veg oc'h arlankañ war ar gornsaer, betek he c'holeiñ ha neuze diaesaat ar gwel. An arbenn a ve an ardizh d'ar skinoù dreistmouk.

ptérygion du cou, **pterygium colli** ◇ **pterygium colli** ◇ **pterygion** g. **gouzoug** ; **gouzoug palvezek** Gouzoug ar gouzviad zo dezhañ un neuz berr, ledan ha nasket, evel pa vije palvezek. Sezet e vez alies an aspleg kroc'hen war an daou du eus ar gouzoug, o vont eus ar vrennigenn betek ar rannbarzh kernskoaz.

ptérygions poplités : **syndrome des** ~◇ **popliteal pterygium syndrome** ◇ **azoniad g. ar pterigionoù arzall** Kamm-neuziad kemplezh o c'hoarvezout eus : asplegoù kroc'hen (pterigionoù) er poullou arzall, a-wechoù astennet eus ar seul d'al lez ha kevredet gant ur palvezadur etremorzhedel pe kazelel; ur boulc'h gant fic'hoù er weuz traoñ; ur miwe a'r bizied hag a'n ivinoù; lies ezreolder a'n organoù troazhganadel. Arsellet ez eus bet degouezhioù familhel, ha reoù all skignek.

ptérygoïde : **processus** ~du **sphénoïde** ◇ **pterygoid process** ◇ **baleg g. elvennek pe elvenneg g.** Baleg askorn ensezet dre ziv wrizienn war dal traoñ ar genneg.

ptérygoïdes de la conjonctive ◇ **false traumatic pterygium** ◇ **gaougilgen g. ar gevresae** Plegoù ar gevresae a englen a-wechoù, war-lerc'h un daraez, ouzh ar gornsae, o kemer neuz ur c'hilgen.

ptérygoïdiennes : **plaques** ~◇ **Parrot's ulcer** ◇ **plakennoù elvennegel** Takadoù melen gouliezek sezet a-gemparzh a bep tu da zlidell greizel ar ouel stavn, dreist holl gant ar magadell atrepsek. Klotañ a reont gant baliroù torgennek furmet el lec'h-se, dindan ar glaourgenn, gant an elvennegoù.

ptilose ◇ **ptilosis** ◇ **1 divalguidad g. 2 ptiloz g.** 1 Kouezh ar malgud. 2 Analeuflegezh diwar dewentañ uloc'h pluñv struskañval.

ptomaïne ◇ **ptomaine** ◇ **ptomain g.** Nep danvezenn alkaloidek dedaolet e-doug breinadur ar protein loenel.

ptomaïnémie ◇ **ptomainemia** ◇ **gwadptomainegezh b.** Bezañs ptomainoù er gwad.

ptomaïnurie ◇ **ptomainuria** ◇ **troazhptomainegezh b.** Bezañs ptomainoù en troazh.

ptomatropine ◇ **ptomatropine** ◇ **ptomatropin g.** Ptomain ar c'hig boutet, heñvel e weredoù ouzh re an atropin.

ptose ◇ **ptosis** ◇ **islink g.** Diskenn pe lakadur uzizel un organ pe ul luniad organel.

ptosis ◇ **ptosis** ◇ **malvennislink g.** (Sl. *bléharoptose*).

ptyaline ◇ **ptyalin** ◇ **ptialin g.** Enzim halvel a dreuzfurm an ampez e dekstroz ha maltos.

ptyalisme ◇ **ptyalism** ◇ **usvorc'h g. halv ; halvusvorc'h** Reñver ar borc'hañ halv, betek 4 pe 5 litr, lakaet er-maez an halv lonket. Arsellet e vez an *h.* e lies neuroz, er vec'hiegi, e anafoù nerval 'zo (seizi gweuz-teod-garloc'henn, seizi an dremm, h.a.), er genaoufoioù (an hini bevargantel pergen).

ptyalocèle ◇ **ptyalocèle** ◇ **halvvozhell b.** Furmadur kistek sezet er gwagrennoù halviñ.

ptyalolithe ◇ **ptyalolith** ◇ **halvvaen gf.** Grouanenn halvel.

ptyalolithiase ◇ **ptyalolithiasis** ◇ **grouanegezh b. halvel, halvc'hrouanegezh** Bezañs grouan e sanoiù degorzhañ ar gwagrennoù halviñ.

pubalgie ◇ **pubalgia** ◇ **kaezourost g.** Laur sezet er rannbarzh kaezourel, o c'hoarvezout dreist holl gant ar sportourion.

pubarche ◇ **pubarche** ◇ **kaezourekadur g.** Dont da gaezourek, gant dinod ar blev kaezour.

pubère ◇ **pubertal** ◇ **kaezourek aa.** O tizhout oad ar gaezouregezh.

pubertaire ◇ **pubertal** ◇ **~kaezouregezh ; kaezouregezhel aa.** A-zave d'ar gaezouregezh.

puberté ◇ **puberty** ◇ **kaezourek b.** Prantad ar vuhez ma piaoueka un hinienn e azvded revel : diorreadur an organoù revel (donedigezh ar mizioù evit ar plac'h, sperbarañ evit ar paotr), dinodadur an eilarouezioù revel.

puberté précoce ◇ **sexual precocity** ◇ **kaezouregezh kentrat** Kaezouregezh a erzerc'h an naousterioù anezhi kent an oad boas. Kemm a vez lakaet etre ar *c'haezouregezh kentrat gwir*, ma tegouezh an azvded revel kent ar c'houlz hag ar *c'haou-gaezouregezh kentrat*, ma 'z eo anadennoù ar c'haezouregezh anreol pe diglok, dezhi lies orin (yoc'henn c'hougorfennel, anaez kaenuslounezhel, h.a.).

pubescence ◇ **pubescence** ◇ **marblevegezh b., dumedegezh b.** Bezañs marblev.

pubescent ◇ **pubescent** ◇ **1 marblevek aa., dumedek aa. 2 kaezourek aa.** 1 Goloet a varblev pe zumed. 2 O tizhout ar gaezouregezh.

pubien ◇ **pubic** ◇ **~kaezour, kaezourel aa. ; a-gaezour** A-zave d'an askorn kaezour.

pubiotomie ◇ **pubiotomy** ◇ **kaezourenbenañ** Skejañ an askorn kaezour er-maez eus ar juntad.

pubis ◇ **pubis** ◇ **askorn g. kaezour** Parzh araok-traoñ askorn al lez.

pubococcygien ◇ **pubococcygeal** ◇ **kaezour-belost aa.** A-zave d'ar c'haezour ha d'ar belost.

pubofémoral ◇ **pubofemoral** ◇ **kaezour-morzhed aa.** A-zave d'an askorn kaezour ha d'an askorn morzhed.

puce ◇ **flea** ◇ **c'hwen s.** Amprevaned gwadezat eus urzh ar sifonapter, arvevaded an den hag al loen, a c'hell trezougen lies pore.

Puente : **maladie de** ~ ◇ **Puente's disease** ◇ **kleñved g. Puente** Gweuzfo gwagrennel eeun arsellet er bugelvezh, naouus dre danijennadur igorennoù kanoligek an adwagrennoù halviñ loet war dal diabarzh ar weuz traoñ.

puériculteur, **trice** ◇ **pediatric nurse** ◇ **mabsavour(ez) g. (b.)** Klañvdiour(ez) arbennikaet o plediñ gant ar vugale yaouank, betek an oad krenn.

puériculture ◇ **puericulture** ◇ **mabsavouriezh b.** Teskad an arouelioù hag an hentennoù desavouriezh kevaraezuz da ziorreadur kreudel ha bredel bonan ar bugel, eus ar c'hanedigezh betek ar c'hrennoad.

puéril ◇ **puerile** ◇ **1 bugelel aa. 2 mibilius aa.** 1 a-zave d'ar bugel, d'ar vugeliezh 2 a-zave d'ur stad a argizadur o tennañ da neuzioù ur bugel, evit un oadour.

- puérilisme** ◇ **puerilism** ◇ **bugegezh** b. Bredanaez an oadouriezh naous dre un argizadur d'ur realezh ha d'ur mod devezout bugelek. En enep d'ar vugelvanegzh, gant ar vugalegzh n'eus ket dre ret a zilerc'h diorren korfel.
- puérilité** ◇ **puerility** ◇ **mibilezh** b. Doareoù un hinienn, un neuzid, ur realezh, naous dre un diouer a azvded, a zonder, a sirusted.
- puerpéral** ◇ **puerperal** ◇ **eskorvezhel** A-zave d'ar prantad goude ar gwilioud. — *darvoudoù eskorvezhel* (Gl. *accidents puerpéraux*) : rouestladoù a c'hell darvezout da geñver pe diouzhtu da heul ar gwilioud (terzienn, gwadliñv, eklampsiezh, h.a.).
- puerpéralité** ◇ **puerperium** ◇ **eskorvezh** g. Prantad o vont eus ar gwilioud d'an distro d'ur stad vonan ent bevedourel, ar peurliesañ da geñver donedigezh en-dro ar mizioù.
- puerpérium** ◇ **puerperium** ◇ **dianwilioud** g. Prantad goude ar gwilioud, betek adkavout ur stad vonan.
- Pulex** ◇ **Pulex** ◇ **Pulex** Genad c'hwen amarvevat bedvroat ouzh an den hag ouzh lies loen. Evel : *Pulex cheopsis* — c'hwen ar razhed — a dreuzkas ar vosenn werblek hag an tifuz logodel ; *Pulex irritans*, c'hwen boutin en Europa, arvevat ouzh kroc'hen an den ; *Pulex penetrans*, turc'hwen (sl. *chique, puce chique, puce des sables*).
- pulicaire** ◇ **flea bite** ◇ **c'hwenbrazhvan** g., **puliker** g. Anaf kroc'hen heñvel ouzh brazhad ur c'hwenenn.
- Pulicidés** ◇ **Pulicidae** ◇ **Pulikideg** Kerentiad amprevaned eus urzh an Afanipter (pe Sifonapter), dezho ur brusk diorreet mat, ur penn bihan, tastornelloù divweuz outo peder rann hag ur c'hof bihan e vent. Ar pavioù diorreet kenan a gevaraez lammat. Er c'herentiad-se emañ an darn vrasañ eus ar c'hwen.
- pulmonaire** ◇ **pulmonary** ◇ **1 skevent ; skeventel** aa. **2 a-skevent** 1 A-zave d'ar skevent. 2 Er gorfadurezh vonan hag en neuzkleñvedouriezh, en amgant ar skevent : talmerenn a-skevent, gwask a-skevent, aergleuzenn a-skevent, h.a.
- pulpation** ◇ **pulp** ◇ **kreudenniñ** El liaerezh, diren danvezennoù struzhel e rezh kreudenn.
- pulpe** ◇ **pulp** ◇ **kreudenn** b. Angevezh apotikel bouk gounezet diwar danvezennoù struzhel.
- pulpe dentaire** ◇ **dental pulp** ◇ **bouedenn** b. **an dant** Gwiad kenglenel bouk, gwazhiedek ha nervaoek kenan, a zo buhez an dant en he dalc'h, o c'henniñ ar gavenn greiz ha kanolioù ar gwriziennoù. War he gorre ez eus ur gwiskad odontoplast a ya an astennadurioù skoultrennek anezhañ e tuellennoù an dentin.
- pulpe des doigts** ◇ **digital pulp** ◇ **mezal** g. **ar bizied** Parzh bouk talbenn palvel pennoù ar bizied.
- pulpe splénique** ◇ **pulp of spleen** ◇ **bouedenn** b. **felc'hel** Gwiad oc'h amparañ parenkim ar felc'h, a leugn an esaouennoù etrekourzadec. Arruz eo he liv (bouedenn ruz), o lakaat war wel dre zargemm ar bolc'hennoù limfoidel arwenn o liv (bouedenn wenn).
- pulpectomie** ◇ **pulpectomy** ◇ **1 dantbouedennezenañ 2 kellvouedennezenañ** 1 Ezvenañ penn da benn bouedenn an dant. 2 Goullonderiñ ar gell eus he endalc'had. Arveret e vez ar wezhiadenn surjaniel-se evit astaliñ borc'hadur an androgenoù e kankr ar raksavenn.
- pulpite** ◇ **pulpitis** ◇ **bouedennfo** g. Taniennadur bouedenn an dant, er brukoù trebarzhus a'n trede derez.
- pulpolithe** ◇ **denticle** ◇ **bouedennvaen** g. Fetisaenn rizek o tiwanañ e bouedenn an dant.
- pulsatif** ◇ **throbbing** ◇ **poulzus** aa. A-zivout ul laur o lammat a-geñver gant ar poulzadennoù talmerel.
- pulsatile** ◇ **pulsatile** ◇ **talmus** aa., **talmek** aa. A zo lusket gant poulzadennoù ar galon, evel da skouer ar *yoc'henn sonnidik talmus* (Gl. *tumeur érectile pulsatile*).
- pulsation** ◇ **pulsation** ◇ **poulzañ & -ad** g., **-adenn** b. ; **talmañ & talm** g. Lamm korvezek ar galon, un dalmerenn pe ar poulz. An hanc'her *talm* a vez arveret evit an talmerennoù pergen, sk. an *talm karotidel*.
- pulsion** ◇ **drive** ◇ **luzad** g. Argerzh dialuskel o c'hoarvezout eus ur bount (bec'hiad gremm, gwereder loc'hañ) a ra d'ar bevedeg skeiñ etrezek ur pal. Hervez Freud, ul luzad zo dezhañ da andon ur broudadur korf (stad tennder) ; e bal eo lemel ar stad tennder a zo en e andon ; dre an ergerc'henn eo e c'hell diraez ar pal (sl. *Geriadur ar Bredelfennerezh*, Preder, 1983).
- pultacé** ◇ **pultaceous** ◇ **yodek** aa. Gant neuz ha kantalc'h, sk. *naouezenn yodek, gorank yodek*.
- pulvérisateur** ◇ **atomizer** ◇ **difruer** g. **-ioù** Ardivink amkanet da vannañ, war ar c'horf pe en aergelc'h ardro, un danvezenn sonnel pe liñvel direet e rannigoù munut kenan.
- pulvérisation** ◇ **pulverization** ◇ **1 euflennañ, hueañ 2 difruañ & -ad** g., **-adenn** b. 1 Diren un danvezenn sonnel e rezh eufl pe hue. 2 Bannañ ur poultr pe un dileizhenn diwar-bouez un difruer.
- pulvérulent** ◇ **pulverulent** ◇ **hueek** aa. A zo e rezh poultr.
- pulvinar** ◇ **pulvinar** ◇ **plueg** b. Gronn adreñv an derc'hvel.
- punaise** ◇ **bedbug** ◇ **louezae** g. **-ed** (sl. *Cimex lectularius*).
- punctiforme** ◇ **punctiform** ◇ **poentek** A stumm gant ur poent, un *elektrod poentek* da skouer.
- punctum proximum** ◇ **near point** ◇ **nesgwelboent** g., **nespoent** g. Ar poent nesañ a c'hell al lagad gwelout spis.
- punctum remotum** ◇ **far point** ◇ **pellwelboent** g., **pellboent** g. Ar poent pellañ a c'hell al lagad gwelout spis.
- pupille** ◇ **pupil** ◇ **mab** g. **lagad** Igorad frankadus ha strishadus kreiz an envez, ma tremen al luc'h. Anv a reer eus *mab lagad kalvezadel* pa wezhier un igorenn en envez e degouezh a zemerez kreiz a'r gornsae pe a'r ferenn.

- pupillomètre** ◇ **pupillometer** ◇ **mabventer** g. Ardivink da vuzuliañ treuzkiz ar mab lagad.
- pupillométrie** ◇ **pupillometry** ◇ **mabventerezh** g. Muzuliadur treuzkiz ar mab lagad.
- pupillomoteur** ◇ **pupillomotor** ◇ **mabloc'hadel** aa. A-zave da loc'h ar mab lagad.
- pupilloplégie** ◇ **pupilloplegia** ◇ **mabseizi** g. Seizi ar mab lagad.
- pupillostatomètre** ◇ **pupillostatometer** ◇ **pupilhostatometr** g. Ardivink da vuzuliañ ar regad etre kreizoù an daou vab lagad.
- pupilotonie** ◇ **pupillotonia** ◇ **pupilhotoniezh** b. Strafulilh ar mabargrezañ ouzh ar gouloù, naouus dre un argrezañ hag un diargrezañ gorrek eus mab al lagad.
- purgatif** ◇ **purgative** ◇ **1 ~ spurjañ, spurjus** aa. **2 lia spurjañ; spurjuzenn** b. 1 Oc'h aesaat diskarg ar bouzelloù. 2 Laoskuzenn rust, strizh he ennegadoù, da skouer evit prientiñ ar gouziviad d'ur skinimbour'h pe d'ur c'holonselliñ. Gant an hirarver anezho e c'hoarvez arsoc'h ha strafuilhoù dourkevionel grevus a-wechoù.
- purgatif anthraquinonique** ◇ **anthraquinone cathartic; anthracene cathartic; emodin cathartic** ◇ **spurjuzenn antrakinonek** Stroll louzeier a denn o ferzhioù spurjañ eus ar vezañs enno eus glikozidennoù an antrakinon : dourhennadoù aloez, kaskara, rubarbez ha sena.
- purgatif drastique** ◇ **drastic purgative** ◇ **spurjuzenn dergasus** Spurjuzenn daer ha hegus he gwered, dañjerus he hirarver. Ur skouer anezhi eo ar spurjuzennoù rousinek.
- purgatif résineux** ◇ **cathartic resin** ◇ **spurjuzenn rousinek** Rousin dergasus, dañjerus. An aozadoù eus ar stroll-mañ, deveret diwar ar jalapez, ar c'holokint hag ar podofill, ne vezont mui arveret.
- purgatif salin** ◇ **saline cathartic** ◇ **spurjuzenn halek** Spurjuzenn diunezet dre euvriñ, na vez ket suget gant ar ganol vezhur, o werediñ dre dreleizhiñ : sulfat magnezium, sulfat natriom.
- purgation** ◇ **purgation** ◇ **spurjañ** Diskargañ ar bouzelloù da heul diounit ul lia spurjus.
- puriforme** ◇ **puriform** ◇ **linheñvel** aa. heñvel ouzh al lin.
- purine** ◇ **purine** ◇ **purin** g. Bonaoad ar bazennoù purek diwar kendouesadur ur c'horvell pirimidin hag ur c'horvell imidazol. Ar bazennoù purek a c'hoarvez eus an adenin hag ar guanin, deveradoù ar purin ha kedrannoù an nukleotidoù anezho.
- purinémie** ◇ **purinemia** ◇ **gwadvec'h** g. **purin, purinwadvec'h** Bec'h ar bazennoù purek er gwad.
- purinogène** ◇ ◇ **1 purineiat** aa. **2 purineiad** g. 1 A-zivout ar bouedoù o tasperzhiañ en enaoz endeuet ar purinoù dre hantererezh an amindrenkennoù a zo enno (trenkenn aspartek, trenkenn c'hlutamek, glikin, serin). 2 Bouedoù purineiat.
- purinomètre** ◇ **purinometer** ◇ **purinventer** g. **-ioù** Ardivink da zewerzhañ bec'h ar bazennoù purek en troazh.
- purique** ◇ **puric** ◇ **purek** aa. A-zave d'ar purin pe d'e zeveradoù.
- Purkinje : cellules de ~** ◇ **Purkinje's cells** ◇ **kelligoù** l. (b.) **Purkinje** Nervgelligoù dezho un neuz tuzum ha perheñvel, a zo durc'haet o dendritoù etrezek an trobarzh hag o aksonoù etrezek an haennoù don, loet etre an haen volekulal hag haen ar greun eus pluskenn an ilpenñ.
- Purkinje : fibres de ~** ◇ **Purkinje's fibers** ◇ **gwiennoù** l. (b.) **Purkinje** Kaherwiennoù bolbousek oc'h amparañ ur rouedad e gwiad endanendotelel kofigoù ar galon, a vez debarzhet dezho treuzkasidigezh ar c'hentrigennoù o loc'hañ eus ar c'hentezioù.
- Purkinje : phénomène de ~** ◇ **Purkinje's phenomenon** ◇ **anadenn** b. **Purkinje** Dic'houested al lagad oc'h argeskediñ diouzh an teñval da zigemmañ al livioù, tra ma c'hell deznadiñ an disterañ sklaerded.
- Purkinje : réseau de ~** ◇ **Purkinje's network** ◇ **rouedad** b. **Purkinje** Skoultrennadurioù dibenn endanenkalonenn an trevnad kalonaoter.
- Purkinje : images de ~** ◇ **Purkinje-Sanson mirror images** ◇ **skeudennoù** l. (b.) **Purkinje** Teir skeudenn ur vammenn luc'h disvannet gant diptroù al lagad, hewel pa arseller mab lagad ur gouzrec'h : an hini gentañ a glot gant gorre araok ar gomsae, an eil gant gorre araok ar ferenn hag an drede, tuginet, gant gorre adreñv ar ferenn.
- purpura** ◇ **purpura** ◇ **purpura** g. Brizhennoù ruz amparet gant ec'hwazhiadoù gwad bihan dangroc'heneel. Ne ziverker ket ar brizhennoù-se gant ar pouezañ. Ar *p.* zo un azon a vez arsellet e lies kleñved, a c'hell bezañ e dalc'h un olpladanoù pe ur vreskedet wazhiedel.
- purpura anaphylactoïde** ◇ **anaphylactoid purpura** ◇ **purpura** g. **gaouzarwalladel** Erwezh allergek adalek ar c'heraez kentañ gant an aozad allergen, hep rekizañ an antikorfoù IgE.
- purpura annulaire télangiectasique** ◇ **purpura annularis telangiectodes** ◇ **purpura** g. **gwalennek bourbonek** Dispuilh gwalennek anlivegat en e greiz, livegennek dre zaspugnadur hemosiderin, o nodiñ war an div c'har ha kevredet gant korwazhiedusvoll ha bronduennoù.
- purpura fulminans** ◇ **purpura fulminans** ◇ **purpura** g. **rurek** Anaer grevus kenan, naouus dre zinodadur lies bronduenñ strewek, o rouestlañ ur pore, ar wadlestegezh veningokokel ent dibarek.
- purpura gangréneux** ◇ **gangrenous purpura** ◇ **purpura** g. **breingedek** Purpura o tedreiñ etrezek ur breinged kroc'heneel, a orin lestel hag a zezaou grevus kenan.

purpura hémorragique ◇ **purpura haemorrhagica** ◇ **purpura g. gwadliñvek** Seurtad purpura ma 'z eo kevredet an dispuilhad kroc'h enel gant gwadliñvoù a'r glourgennoù. A-wechoù e vez amberzet an termen-se evit *kleñved Werlhof*.

purpura hyperglobulinémique ◇ **hyperglobulinic purpura** ◇ **purpura g. globulinwadusvec'hiadel** Kleñved unanhangaeel a-geñver gant ur globulinwadusvec'h monoklonel IgG, a zedro kuñv hag o tizhout ar venev. Kevrediñ a ra : ur purpura strewek, arzostoù, c'hwarrennoù hag un azoniad Raynaud. Ur c'hleñved an hangaegemplezhioù eo, a c'hell bezañ kevredet gant anaezioù all.

purpura infectieux ◇ **infectious purpura** ◇ **purpura g. poreel** Azoniad o naoiñ dre azonoù poreel grevus, un dispuilhad purpura ha lies gwadliñv. Ar *p. p.* a c'hell bezañ devoudet gant lies garvev ha dreist holl gant ar meningokok.

purpura papuleux de Hebra ◇ **Hebra's papulous purpura** ◇ **purpura g. krugennek Hebra** Kroc'h enad henek hag adfeilhus o tarvezout gant an oadour, naouus dre un dispuilhad war an izili eus brizhennoù purpurek ferek, krugennek ha dre un daralladur eus ar stad hollek.

purpura rhumatoïde ◇ **rheumatic purpura, Henoch-Schönlein purpura** ◇ **purpura g. rumatoïdel** Anaez ar bugelvezh hag ar c'hrennoadvezh naouus dre erzerc'hadoù arzel (arzostoù dilec'h hiat ha kemparzhpek peurliesañ), dre anadennoù kreuz-pervez angarv a-walc'h ha dre zispuilhadoù kroc'h en (fennigoù, bronduennoù, a-wechoù krugennoù linadellvanek) loet a-gemparzh war an izili traoñ, a-wechoù war ar revr, an arvrer'hioù hag an ilinoù. Dedreiñ a ra a-fragadoù, delanket alies gant al loadur war sav. A-wechoù e c'hoarvez rouestladoù : an droazhwadegezh hag an droazhproteinegezh, pe darvoudoù kof lemm (*purpura kofel Hensch*), o c'hrevusaat da heul an deznau a zo e dalc'h tizhadur al lounezh. Hañvalout a ra bezañ ereet ouzh un direizh eus heforzhded ar c'horrwazhied a orin allergek ; reol eo holl brouadoù ar gwadkaeañ. Emañ ar *p. r.* e dalc'h ur gwazhiedfo trogorfat a'r gwazhied bihan, naouus dre goc'honiadoù IgA e speurioù ar gwazhied hag er bloueigoù (Cf. *angéite allergique, purpura anaphylactoïde*).

purpura de Seidlmayer ◇ **Seidlmayer's syndrome** ◇ **purpura g. Seidlmayer** Seurtad purpura dibaot o tarvezout trumm gant ar vagadell, naouus dre vronduennoù kokardennek hag elfennoù purpurek marvennek sezet war an dremm, war an daouarn hag an divesker, kevredet gant gouliñvoù hanrannel damheñvel ouzh gouliñv Quincke. Tizhadoù flugezel (lounezh) a c'hell c'hoarvezout. Mat eo ar stad hollek hag an dedro, a-fragadoù, a echu en ur mizvezh dre ar pare. Ne stader ezreolder ebet evit prouadoù ar gwadkaeañ. Ar c'hleñved-se, anavezet fall e arbenn, a orin allergek marteze, zo bet nesaet ouzh ar purpura rumatoïdel, ouzh triazon Gougerot, an eritem liesneuz, al linadell wadliñvek hag azoniad Sweet.

purpura sénile de Bateman ◇ **purpura senilis** ◇ **purpura g. kozhiadel Bateman** Kroc'h enad o tarvezout gant an henaded, naouus dre vezañ brizhennoù purpurek war an divarvrer'h hag an divesker, oc'h adfeilhañ e-doug bloavezhioù ; e dalc'h dic'henezhadur kozhiadel ar c'hroc'h en e ve.

purpura thrombocytopénique thrombotique ◇ **thrombotic thrombocytopenic purpura** ◇ **purpura g. olpladanel tromboseiat** Purpura grevus kenan gant gwadliñvoù daskenek, direizhoù nerval, skorted avu. Outañ e kevred un amwad loezadel hag ur furmadur korrdrombuzoù er gwazhied bihan. Dianav eo an arbenn.

purpura thrombopénique ◇ **thrombocytopenic purpura** ◇ **purpura g. olpladanel** Dinod trumm fennigoù ha gwadliñvoù a'r glourgennoù, gant olpladanoù ha direizhoù pladanel, o dedreiñ a fragadoù grevus pe c'hrevusoc'h.

purpura thrombopénique idiopathique ◇ **idiopathic thrombocytopenic purpura** ◇ **purpura g. olpladanel hennadek** Purpura e dalc'h un olpladanoù unanhangaeel. Bez' ez eus ur furm lemm, paotoc'h gant ar vugale hag ur furm henek paotoc'h gant ar merc'hed oadour, a orin unanhangaeel.

purpurique ◇ **purpuric** ◇ **purpurek aa.** A-zave d'ar purpura.

Purtilo : syndrome de ~ ◇ **Purtilo's syndrome** ◇ **azoniad g. Purtilo** Azoniad limfneradel dibaot ha hilel, X-ereet an treuzkas anezhañ. Gant ar baotredigoù hangaeastalet, ar c'hentporead gant ar viruz EB a c'hell bezañ marvus buan kenan.

Purtscher : syndrome ou rétinite ou rétinoopathie de ~ ◇ **Purtscher's disease, angiopathic retinopathy** ◇ **azoniad g. pe luc'hsaefo g. pe luc'hsaead g. Purtscher** Azoniad lagadel o tarvezout un nebeut eurvezhioù pe un nebeut devezhioù war-lerc'h un dareez a zo lec'hiet ar poent enorc'h pell diouzh al lagad (flastr ar brus, torr ar c'hloppenn pe eskern an izili). Naouiñ a ra dre ul leiadur eus ar gweled daoulagadel ha dre ur gouliñv a'l luc'hsae, strewek, arlouet, gant daspugnadoù malzennek a-hed ar gwazhiennnoù ha gant gwadliñvoù el luc'hsae. Dedreiñ a ra etrezek ar steuziadur pe an dallentez. Ur strafuilh gwazhiedel eo, devoudet gant un uswask gwazhiennel war diriad an empenn pe gant enfreier behinel evodet eus an eskern.

purulence ◇ **purulence** ◇ **1 linegezh b. 2 linusted b.** 1 Stad ar pezh a zo linek. 2 Stad ar pezh a zo linus.

purulent ◇ **purulent** ◇ **1 ~lin, linek aa. 2 linus aa.** 1 A zo lin e-barzh. 2 A zec'han lin.

purulent

• *collection purulente* daspugnad lin • *une bronchiole à contenu purulent* ur gorrvronkezenn karget a lin • *ulcération purulente* gouliez linus • *méningites purulentes* pilhonfoioù linek.

pus ◇ **pus** ◇ **lin g.** Liñvenn dev pe devoc'h, liesliv, o tinaouiñ diouzh un danijenn lemm pe henek, a c'hoarvez eus ur parzh liñvel pe gwadvezh hag eus ur parzh sonnel amparet gant leukokit darallet mui pe vui, gant rannigoù behin, trenkennoù druz ha garvevien. Meur a zoare lin a zigemmer : a) al lin glas (Gl. *pus bleu*, Sz. *blue pus*) dec'hanet gant ar bazheloù piokianek ; b) al lin keuzennek (Gl. *pus caséus*, Sz. *cheesy pus*), tevoc'h, hogos sonnel, o tennañ d'ar c'heuz ; c) al lin chokolad (Gl. *pus chocolat*, Sz. *anchovy sauce pus*), a liv gant ar chokolad o tont eus ar pugnezoù amobel ; d) al lin diennheñvel (Gl. *pus crèmeux*, Sz. *curdy pus*), tev en arbenn eus sourusted an elfennoù sonnel ; e) al lin meuladus (Gl. *pus louable*, Sz. *laudable pus*), melenoc'h, tev dre

berzh ar fibrin paot ennañ, sellet gwechall evel a erdeb azoù; f) al lin gwadek (Gl. *pus sanieux*, Sz. *sanious pus*), sklaeroc'h, gwad ennañ; g) al lin levrus (Gl. *pus séreux*, Sz. *serous pus*), damvoull ha berus kenan en arbenn eus ar parzh liñvel a-fonn ennañ.

pustulation ◇ **pustulation** ◇ **burbuenniñ** Dinodadur burbuennoù war ar c'horf.

pustule ◇ **pustule** ◇ **burbu s. -ad, -enn** Anaf kroc'hen naouus dre ur bos ezkroc'heneñ ennañ ul liñvenn linek. — Ar *vurbuenn yud* (Gl. *pustule maligne*, Sz. *malignant anthrax*) eo furm voasañ ar serk gant an den. Deraouiñ a ra gant c'hwezigennoù bihan leun a levrzenn a ya an diaz anezho war argalediñ buan, lec'h ma tinod ur blakenn vreinged, un tachad tanijennek en dro dezhi. A nes da nes e ledana emberr ar gouliñv ha gwelout a reer oc'h erzerc'haat an anadennoù devoudet gant ar poreadur hollekaet (sl. *charbon*).

pustuleux ◇ **pustular** ◇ **burbuennec aa.** Naouus dre ar vezañs eus burbuennoù.

pustuliforme ◇ **pustuliform** ◇ **burbuennheñvel aa.** Heñvel ouzh ur vurbuenn.

pustulose ◇ **pustulosis** ◇ **pustuloz g.** Anaev o naouiñ dre furmadur burbuennoù niverus.

pustulose exanthématique aiguë généralisée ◇ **acute generalized exanthematous pustulosis** ◇ **pustuloz eksantematek lemm hollekaet** Dispuilhad kroc'heneñ debronek ha hollekaet eus burbuennoù bihan dishadenn anvolc'hennek war ur goueled eritematus, kevret gant terzhienn uhel ha gwadeleozinofil. Dedreiñ a ra etrezek ar gourc'hennadur war-lerc'h un dek devezh bennak. Liaien eo an arbenn (penikillineier ha makrolideier pergen).

pustulose sous-cornée de Sneddon et Wilkinson ◇ **Sneddon-Wilkinson syndrome** ◇ **pustuloz endan-kornhaen Sneddon ha Wilkinson** Anaf kroc'hen naouus dre un dispuilhad, war kef ha gwirizienn an izili, eus c'hwezigenburbuennoù dishadenn bas kenan, loet strizh dindan gornhaen an ezkroc'heneñ, o taskantañ e rezh plakadoù kelc'hennek a zedro ezkreizet hag aremstlej, oc'h adfeilhañ e-doug mizvezhioù ha bloavezhioù, hep darallañ ar stad hollek.

pustulose vacciniforme ou varioliforme aiguë ou varicelliforme ◇ **eczema herpeticum** ◇ **pustuloz vaksinvanek pe brec'hvanek lemm pe brec'hnijvanek** Dispuilhad burbuennoù ampukadek kevredet gant gouliñv, o tinodiñ peurliesañ war un ekzema eus an dremm gant bugale yaouank ha tuet da emledañ. Ar burbuennoù-se, heñvel ouzh re ar vuvrec'h pe ar vrec'h, a zedro peurliesañ etrezek ar pare en un nebeut devezhioù, ar stad hollek o chom mat daoust d'un derzhienn uhel; neoazh, gant ar vugale yaouank kenan ha pa vez muiek an dispuilhad, e c'hell an dedro bezañ marvus. Dindan gevarguz emañ natur an dispuilhad-se, gwech vaksinel, gwech erorel.

putamen ◇ **putamen** ◇ **kloseñ b.** Parzh diavaez eus gronn ferek ar rizeneg.

putréfaction ◇ **putrefaction** ◇ **breinañ** Argerzh ec'haozañ an danvezioù bevel, loenel pe struzhel, devoudet gant bakteri anaerat evit an darn vrasañ. Disoc'h ar breinadur zo enaoz danvezioù nevez, pistriek peurliesañ, hag aezhennoù flaerius.

putrescible ◇ **putrescent** ◇ **breinadus aa.** En araez da vreinañ.

putride ◇ **putrid** ◇ **louez aa.** A daol ur c'hwezh flaerius ha doñjerus, evel ur c'horf o vreinañ.

PUVathérapie ◇ **PUVA therapy** ◇ **PDMAgurañ** Araezad yac'hadel oc'h arverañ ar psoralenou hag ar skinoù dreistmouk A (PDMA) : ur seurtad kimigurañ luc'hvliadel eo. Ar psoralenou blivaet gant ar skinoù dreistmouk A a zevoud daralladurioù e luniadurioù ar c'helligoù. Arveret e vez ar P da brederiañ kroc'henadoù 'zo : psoriáziz, mikoziiz fongoidel, vitiligo, liken plaen, h.a. (sl. *psoralène, rayonnement ultraviolet*).

pyarthrite ou **pyarthrose** ◇ **pyarthrosis** ◇ **piartroz g.** Arzfo linus.

pycnique ◇ **pyknic** ◇ **fergorf aa.** A gorfadur tuzum, krenn ha tev un disterañ, kevenebet ouzh ar rizh mengorf.

pycnôide ◇ **pyknomorphous** ◇ **ferstum aa.** A neuz ledan ha tev.

pycnomorpe : état ~◇ **pyknomorphie stage** ◇ **stad ferstum** Stad nervelligoù 'zo da heul ar c'hromatinloezañ.

pycnose ◇ **pyknosis** ◇ **piknoz g. pe kraoñellskoan g.** Unan eus tri mod displeberañ ar graoñell pa varvenn ar gellig, dezverket gant krizañ ar graoñell, houmañ o vont bihan, doues ha bazennlen kenan.

pycnotique ◇ **pyknotic** ◇ **piknotek aa.** A-zave pe gant ar piknoz.

pyélectasie ◇ **pyelectasis** ◇ **lestrusvoll g.** Usvoll lestr al lounezh.

pyélique ◇ **pyelic** ◇ **(al) lestr** A-zave da lestr al lounezh, sk. *kavenn al lestr*.

pyélite ◇ **pyelitis** ◇ **lestrfo g.** Poreadur foel lemm pe henek ar glauourgenn o pallennañ lestr al lounezh, devoudet alies gant ar golibazhell, ha kevredet, pe gant ur poread lounezh (lestrlounezhfo), pe gant ur poread c'hwezhigell (lestrc'hwezhigellfo).

pyélite calculeuse ◇ **calculous pyelitis** ◇ **lestrfo grouanien** Lestrfo devoudet gant ur c'hrouanenn e lestr al lounezh.

pyélite hémotogène ◇ **hematogenous pyelitis** ◇ **lestrfo gwadien** Poreadur lestr al lounezh treledet dre hent ar gwad, kevredet ar peurliesañ gant ul lounezhfo.

pyélite urogène ◇ **urogenous pyelitis** ◇ **lestrfo troazhien** Diwar treled askennus, dre ar forzhioù troazhañ, eus ur poread a'r c'hwezhigell, ar peurliesañ e dalc'h un troazhkae devoudet gant ur skoilh ouzh an diverañ er forzhioù troazhañ izelañ. Anvet ivez *lestrfo askennus*.

pyélocaliciel ◇ **pyelocaliceal** ◇ **lestrkalirel aa.** A-zave da lestr ha kalirou al lounezh.

pyélocystite ◇ **pyelocystitis** ◇ **lestrc'hwezhigellfo g.** Taniennadur lestr al lounezh hag ar c'hwezhigell.

- pyélogramme** ◇ **pyelogram** ◇ **lestrlunad g.** Skeudenn disc'h eus al lestrluniñ.
- pyélographie** ◇ **pyelography** ◇ **lestrluniñ** Skinluniñ kavennañ al louezh hag ar sanioù troazh goude ensinklañ un aozad dargemm.
- pyélographie ascendante** ◇ **ascending pyelography** ◇ **lestrluniñ war askenn** Lestrluniñ dre ar forzh sandroazhel, anvet ivez *lestrluniñ a-gilred*.
- pyélographie descendante** ◇ **intravenous pyelography** ◇ **lestrluniñ war ziskenn** Lestrluniñ dre ensinklañ engwazhiennel un aozad dargemm, ezvevennet dre al louezh, anvet ivez *lestrluniñ engwazhiennel*, *lestrluniñ ezvevennañ*.
- pyéolo-iléostomie** ◇ **pyeloileostomy** ◇ **dasforzhañ lestr-klunegenn** Oberatadenn amkanet da wehenniñ lestr al louezh etrezek ar c'hroc'hen, pe etrezek ar c'hwezbigell — ha neuze e reer anv a *dasforzhañ lestr-klunegenn-c'hwezbigell* Gl. *pyéolo-iléocystostomie* — dre ur c'hilbleg eus ar vouzellenn voan o talvezout da bontadur.
- pyéolithotomie** ◇ **pyelolithotomy** ◇ **lestrvaenezvenañ** Lestrezvenañ embreget evit eztennañ grouan loet e lestr al louezh.
- pyélonéphrite** ◇ **pyelonephritis** ◇ **lestrlouezhfo g.** Naoued foel a orin bakteriel oc'h angorzhañ lestr ha parenkim al louezh (reizhiad pibelle ha gwriad entremezel).
- pyélonéphrite ascendante** ◇ **ascending pyelonephritis** ◇ **lestrlouezhfo askennus** Louezhfad entremezel eilvedel d'un anaf stevius alies pe ur strafuilh eus arc'hwel ar forzhioù degorzhañ. Heñvelster *louezhfad askennus*.
- pyélonéphrite emphysémateuse** ◇ **emphysematous pyelonephritis** ◇ **lestrlouezhfo emfizematus** Seurtad grevus a lestrlouezhfo arsellet ar peurliesañ gant an diabetieon, kevredet gant bezañs aezhenn (dinoet dre skinluniñ pe skinerluniñ) a orin bakteriel (*Escherichia coli*) e parenkim al louezh, en tachad tro-louezh, hag en tachad endan-ampelenn zoken.
- pyélonéphrite gravidique** ◇ **pyelonephritis of pregnancy** ◇ **lestrlouezhfo bec'hiegal** Tanijennadur ar forzhioù troazhañ (forzhioù degorzhañ ha gwriad entremezel al louezh) e-doug ar vec'hiegal.
- pyélonéphrite xanthogranulomateuse** ◇ **xanthogranulomatous pyelonephritis** ◇ **lestrlouezhfo ksantogranulomatus** Furm a lestrlouezhfo henek gant fibroz foel paot ennañ an histiokit spoumek. Rouestlad boas ar poreadoù dre *Proteus*.
- pyélonéphrose** ◇ **pyelonephrosis** ◇ **pielonefroz g.** Nep anaez eus al lestr hag eus al louezh a natur anfoel.
- pyélonéphrotomie** ◇ **pyelonephrotomy** ◇ **lestrlouezhenbenañ** Lestrenbenañ a-ser gant louezhenbenadurioù bihan.
- pyéloplastie** ◇ **pyeloplasty** ◇ **lestratelviñ** Surjianerezh atelviñ dewerc'het war lestr al louezh.
- pyéloscopie** ◇ **pyeloscopy** ◇ **lestrselliañ** Skinselliañ lestr al louezh goude ensinklañ engwazhiennel pe ensandroazhel un aozad dargemm.
- pyélostomie** ◇ **pyelostomy** ◇ **lestrezforzhañ** Skarvañ padennek lestr al louezh ouzh ar c'hroc'hen war-benn kevaraezañ skarzh rageeun an troazh war-du an diavaez.
- pyélotomie** ◇ **pyelotomy** ◇ **lestrenbenañ** Flañchañ lestr al louezh.
- pygomèle** ◇ **pygomelus** ◇ **pigomel g.** Euzheg daouat naouus dre ar vezañs eus un pe zaou ezel dreistniver ensoc'het e rannbarzh peñsel an aotosit.
- pygopage** ◇ **pygopagus** ◇ **pigopag g.** Euzheg daouat a zo an daou berzhiad anezhañ unanet dre ar rannbarzh peñsel.
- Pyle** : **maladie de ~** ◇ **Pyle's disease** ◇ **kleñved g. Pyle** Reledanded ardalpennoù an eskern gant korreded hag argrommedd an eskern. Anaez hêrezhel gant treuzkas aotozomek enkilek.
- pyléplébite** ◇ **pylephlebitis** ◇ **porzhfo g.** Gwazhiennfo ar wazhienn borzh pe ar barroù anezhi.
- pyléthrombose** ◇ **pylethrombosis** ◇ **porzhtromboz g.** Tromboz ar wazhienn borzh.
- pyloralgie** ◇ **pyloralgia** ◇ **porzhierost b.** Laur e rannbarzh ar porzhier.
- pylore** ◇ **pylorus** ◇ **porzhier g.** Gwask difourk ar stomok ouzh e lakaat kehent gant an daouzegenn.
- pylorectomie** ◇ **pylorectomy** ◇ **porzhierzevenañ** Dazbidañ ar porzhier.
- pylorique** ◇ **pyloric** ◇ **~porzhier, porzhierel aa.** A-zave d'ar porzhier.
- pylorisme** ◇ **pyloric spasm** ◇ **porzhierandag g.** Tuadur da andag kigennadur ar porzhier, devoudet, pe gant ur c'houliez eus ar glaourgenn a gefinded, pe gant ur stad vregoazhus, gant kizidigezh dibarek benvegad santadel-loc'hadel ar stomok.
- pylorite** ◇ **pyloritis** ◇ **porzhierfo g.** Tanijenn glaourgenn ar porzhier.
- pylorobulboscopie** ◇ **pylorobulboscopy** ◇ **porzhierc'hodengweliñ** Edañvengweliñ an treizher ha god an daouzegenn dre araez ur fibroskop saezhvuk.
- pyloroclasie** ◇ **pyloroclasia** ◇ **porzhierglampañ** Gwezh surjanel, anezhañ gwaskañ ar porzhier diwar-bouez ur c'hlamp.
- pyloroduodénite** ◇ **pyloroduodenitis** ◇ **porzhierdaouzegennfo g.** Tanijenn glaourgenn ar porzhier ha hini an daouzegenn.
- pylorogastrectomie** ◇ **pylorogastrectomy** ◇ **porzhiergreuzzevenañ** Nep dazbidañ taread pellek ar stomok, ar porzhier ennañ.
- pyloromyotomie extramuqueuse** ◇ **pyloromyotomy** ◇ **porzhiergigennenbenañ ec'hlaourgenn** Enbenañ kigenn gelc'hs-trishaer ar porzhier, dewerc'het da ergurañ ar porzhierandag pe da gurañ isvoll ar porzhier.

- pyloroplastie** ◇ **pyloroplasty** ◇ **porzhieratelviñ** Surjianerezh atelviñ ar porzhier embreget da ergurañ an dassav kreuzel da-geñver an dispisenbenañ pe e degouezh isvoll.
- pylorospasme** ◇ **pylorospasm** ◇ **porzhierandag g. an nevezc'haned** Dargrezad dasstrizhek kigenn gelc'hstrishaer ar porzhier arsellet gant ar magadelled o kas d'ur fallezh dre c'hweladoù arreat.
- pylorosténose** ◇ **pylorostenosis** ◇ **porzhierisvoll g.** Enkadur ar porzhier.
- pylorostomie** ◇ **pylorostomy** ◇ **porzhieriezforzhañ** Skarvañ mougev ar porzhier ouzh speur ar c'hof.
- pylorotomie** ◇ **pylorotomy** ◇ **porzhierenbenañ** (sl. *pyloromyotomie extramuqueuse*).
- pyocéphalie** ◇ **pyocephalus** ◇ **empennlinegezh b.** Bezañs lin e kambrou an empenn.
- pyocholécystite** ◇ **purulent cholecystitis** ◇ **linvestlgellenfno g.** Bestlgellenfno linek.
- pyocine** ◇ **pyocin** ◇ **piokin g.** Bakteriokin danzeet gant skodoù 'zo a *Pseudomonas aeruginosa* (bzhell piokianek).
- pyocolpos** ◇ **pyocolpos** ◇ **gouinlinegezh b.** Hogennad lin er gouin.
- pyocoque** ◇ **pyococcus** ◇ **piokok g. & s.** Nep kok e devoud poreadoù linek, da skouer stafilokok, strepokok.
- pyoctanine** ◇ **pyoktanin** ◇ **pioktanin g.** Anv lies livuzenn dezho perzhioù dilestus, arveret el lagadouriezh ouzh poreadoù linus ar gevresae hag ar forzhioù daeraouiñ, hag er groc'henouriezh. Da skouer : ar *p.* glas (persruz jañsif), ar *p.* melen (aoramin).
- pyoculture** ◇ **pyoculture** ◇ **lindiñvañ** Tiñvañ bakteri diwar-bouez un erlamad lin.
- pyocyanine** ◇ **pyocyanin** ◇ **piokianin g.** Livegenn c'hlas (deverad eus an alfahidroksifenazin dre vetilañ) danzeet gant *Pseudomonas aeruginosa* hag e devoud livrezh glas al lin er goulioù poreet gant ar garvev-se.
- pyocyanique (bacille)** ◇ **pyocyanic** ◇ **piokianek aa.** Hanc'her o teanviñ *Pseudomonas aeruginosa*.
- pyocyste** ◇ **pyocyst** ◇ **lingist g.** Kist lin ennañ.
- pyocyte** ◇ **pyocyte** ◇ **piokit s.** Leukokit war zic'henezhañ kavet niverus el lin.
- pyodermatose** ◇ **pyodermatitis** ◇ **lingroc'henad g.** Termen damheñvelster gant *lingroc'henfo* (sl. *pyodermite*).
- pyodermie** ou **pyodermite** ◇ **pyoderma** ◇ **lingroc'henfo g.** Nep poread kroc'hen lineiat : hesked, impetigo, bolc'hennfo, h.a.
- pyodermite végétante** ◇ **dermatitis vegetans** ◇ **lingroc'henfo struzhennek** Poread kroc'hen stafilokokel gant gorreennoù struzhennek kevredet gant burbuennoù bolc'hennek.
- pyogène** ◇ **pyogenic** ◇ **1 lineiat aa. 2 lineiad g. -où** 1 O tevoudañ furmidigezh lin — al linañ —, a-zave dreist holl da c'harvevion 'zo (strepokok, stafilokok). 2 Garvev lineiat.
- pyogénie** ◇ **pyogenesis** ◇ **lineiadezh b.** Dec'han lin.
- pyohémie** ◇ **pyohaemia** ◇ **gwadlinegezh b.** (sl. *septicopyohémie*).
- pyo-hémithorax** ◇ **pyohemothorax** ◇ **linruskwadad g.** Fennad krezoù amparet gant lin ha gwad.
- pyoïde** ◇ **pyoid** ◇ **linvabek aa.** Heñvel ouzh al lin.
- pyolabyrinthite** ◇ **pyolabyrinthitis** ◇ **linvilendallfo g.** Tanijern linus ar milendall.
- pyomètre** ou **pyométrie** ◇ **pyometra** ◇ **krozhlinegezh b.** Daspugnad lin er grozh.
- pyométrite** ◇ **pyometritis** ◇ **lingrozhfo g.** Krozhfo linus.
- pyomyosite** ◇ **pyomyositis** ◇ **lingaherfo g.** Anaev trovanel naouus dre furmidigezh pugnezoù enkaherel, devoudet gant stafilokok aourliv ar peurliesañ.
- pyonéphrite** ◇ **pyonephritis** ◇ **linlounezhfo g.** Lounezhfo devoudet gant bezañs pugnezoù lineiat bihan e-barzh parenkim al lounezh.
- pyonéphrolithiase** ◇ **pyonephrolithiasis** ◇ **linlounezhgrouanegezh b.** Bezañs lin ha grouan el lounezh.
- pyonéphrose** ◇ **pyonephrosis** ◇ **linlounezhad g.** Lounezhad naouus dre zaspugnadoù lin e-barzh lestr, kaliroù ha parenkim al lounezh.
- pyopéricarde** ◇ **pyopericardium** ◇ **amgalonennlinegezh b.** Daspugnad lin en amgalonenn.
- pyopéricardite** ◇ **pyopericarditis** ◇ **linamgalonennfo g.** Amgalonennfo linus.
- pyopéritoine** ◇ **pyoperitoneum** ◇ **ampelennlinegezh b.** Daspugnad lin e kavenn an ampelenn.
- pyopéritonite** ◇ **pyoperitonitis** ◇ **linampelennfo g.** Ampelennfo linus.
- pyophagie** ◇ **pyophagia** ◇ **linlonk g.** Lonkadur lin.
- pyophylactique** ◇ **pyophylactic** ◇ **linergostus aa.** O wareziñ enep ar poreadoù linek.
- pyophysomètre** ◇ **pyophysometra** ◇ **krozhlineazhad g.** Hogennadur lin hag aezhenn e kavenn ar grozh.
- pyopneumocholécystite** ◇ **pyopneumocholecystitis** ◇ **linaezhbvestlgellenfno** Linvestlgellenfno, ar gellenn vestl o vezañ dardennet gant aezhennoù.

- pyopneumohydatide** ◇ **pyopneumohydatid** ◇ **linaezhhidatid** g. Kist hidatek linus gant furmidigezh aezhenn.
- pyopneumopéricarde** ◇ **pyopneumopericardium** ◇ **amgalonennlinaezhad** g. Bezañs lin hag aezhennoù e kavenn an amgalonenn.
- pyopneumopérihépatite** ◇ **pyopneumoperihepatitis** ◇ **linaezhstirsaefo** g. Linstirsaefo kevredet gant furmidigezh aezhennoù.
- pyopneumopéritoine** ◇ **pyopneumoperitoneum** ◇ **ampelennlinaezhad** g. Hogennadur lin hag aezhenn e kavenn an ampelellenn.
- pyopneumopérítionite** ◇ **pyopneumoperitonitis** ◇ **linaezhampelennfo** g. Ampelennfo linus gant hogennadur aezhennoù e kavenn an ampelellenn.
- pyopneumothorax** ◇ **pyopneumothorax** ◇ **linruskaezhad** g. Daspugnad lin hag aezhennoù e kavenn ar c'hrezoù.
- pyopneumothorax sous-phrénique** ◇ **subphrenic pyopneumothorax** ◇ **linruskaezhad endan-vegin** Furm a linaezhstirsaefo sezet etre an avu hag ar gelc'hseurenn oc'h erzerc'haat ent klinikel dre azonoù boas ar bruskaezhad.
- pyorrhée** ◇ **pyorrhoea alveolaris** ◇ **linver** g. Beradur lin.
- pyorrhée alvéolo-dentaire** ◇ **pyorrhoea** ◇ **linver logig-dant** Poread henek linus eus elfennoù gouskor an dent (amzantenn, askorn al logig ha munsun).
- pyosalpingite** ◇ **pyosalpingitis** ◇ **lingorzennfo** g. Korzennfo linus.
- pyosalpingo-oophorite** ◇ **pyosalpingo-oophoritis** ◇ **lingorzennvierezfo** g. Tanijern linek eus korzenn ar grozh hag eus ar vierez.
- pyosalpinx** ◇ **pyosalpinx** ◇ **korzennlinegezh** b. Daspugnad lin e korzenn ar grozh.
- pyosclérose** ◇ **pyosclerosis** ◇ **linskleroz** g. Linadur henek e-barzh ur gwiad sklerozek.
- pyosepticémie** ◇ **pyosepticemia** ◇ **linwadlestegezh** b. (sl. *septicopyohémie*).
- pyospermie** ◇ **pyospermia** ◇ **sperlinegezh** b. Bezañs lin er sper.
- pyostercoral** ◇ **pyostercoral** ◇ **linoulennel** aa. A-zave d'an oulennoù linek.
- pyothorax** ◇ **pyothorax** ◇ **linKrezennfo** g. Daspugnad lin e-barzh kavenn ar c'hrezoù, eilvedel d'ur skeventad lemm.
- pyo-uretère** ◇ **pyoureter** ◇ **sandroazhlinegezh** b. Hogennadur lin er san droazh.
- pyramidal** ◇ **pyramidal** ◇ **1 & 2 pikernennek** aa. 1 A stumm gant ur bikernenn. 2 A-zave d'ur bikernenn.
- faisceau pyramidal** ◇ **cerebrospinal tract** ◇ **stirad** g. **pluskenn-livenn pe stirad** g. **pikernennek** Etre pluskenn an empenn hag ar mel a-livenn ez eus un hordenn graet gant gwiennoù nerval a zo astennoù diouzh neuron loet er bluskenn, korf an neuron-se o vezañ a stumm pikernennek, anezho ar *c'helligoù pikernennek*. Alese, e reer eus hordenn ar gwiennoù ar *stirad pikernennek*, eus an azoniad diwar anaf an hordenn-se an *azoniad pikernennek*, h.a. El latin mezegezh hag er yezhoù arnevez all e reer ivez *cellulae pyramidales*, *fasciculus pyramidalis* hag evit an azoniad : Gl. *syndrome pyramidal*, Sz. *pyramidal syndrome*.
- os pyramidal** ◇ **triquetral bone** ◇ **trizueg** g. Askorn eus renkad kentañ eskern an arzorn, loet e-barzh al loareg hag a-us d'ar bac'heg.
- pyramidal : syndrome** ~ ◇ **pyramidal syndrome** ◇ **azoniad** g. **pikernennek** Azoniad diwar anaf ar stirad pikernennek, eus pluskenn an empenn d'ar mel a-livenn. Kevrediñ a ra divigad loc'hadel, direizhoù an tant hag an damougoù.
- pyrane** ◇ **pyran** ◇ **piran** g. Kediad heterokiklek a zo en e gorrvell pemp atomenn garbon hag un atomenn oksigen, kavet en ozioù pergen.
- pyranose** ◇ **pyranose** ◇ **piranoz** g. Furm izomerek ozioù 'zo, heñvel o luniadur ouzh hini ar piran.
- pyrazol** ◇ **pyrazol** ◇ **pirazol** g. Danvezenn strinkennek bazek, deveret diouti an dic'hosterioù hag an enepertzhienneier (deveradoù ar pirazol).
- pyrazolone** ◇ **pyrazolone** ◇ **pirazon** g. Deverad ar pirazol, heñvel e wered ouzh hini ar fenazon, bihanoc'h e werc'h avat.
- pyrétique** ◇ **pyretic** ◇ **1 terzhiennek** aa., **gwresterek** aa. **2 terzhiennel** aa., **gwresterel** aa. 1 Gant terzhienn. 2 A-zave d'an derzhienn (sl. *fébrile*).
- pyrétogène** ◇ **pyretogenous** ◇ **gwresterus** aa. A zec'han terzhienn.
- pyrétologie** ◇ **pyretology** ◇ **gwresterouriezh** b. Diskiblezh o studiañ an terzhiennoù.
- pyrétothérapie** ◇ **pyretotherapy** ◇ **gwrestergurañ** Arver yac'hadel ar gwrester devoudet ent danzeadel dre ensinklañ pe diounit gwezherioù gwresterus liesseurt : enkorañ ar baludegezh, ensinklañ vaksinoù, trewrezañ.
- pyrexie** ◇ **pyrexia** ◇ **gwrester** g. Anvad rumm ar c'hleñvedoù terzhiennek.
- pyridine** ◇ **pyridine** ◇ **piridin** aa. Liñvenn diliv, bazek, douhennet eus an ter glaou, dilestus, enebandag ha kalonusreüs.
- pyridoxine** ◇ **pyridoxin** ◇ **piridoksin** g. Vitamin B6, deverad piridinek (klorhidrat pirodoksol) o tasperzhiañ e kennevid ar proteinoù, an druzennoù hag ar glukidoù. Bezant eo en edeier, el laezhadoù, er vioù, en avu hag er c'hig. Ar mamenoù naturel

anezhañ zo ar goell bier, eginou an ed, ar c'higoù, al legumaj glas hag ar frouezh fresk. An negez anezhañ a zevoud, gant an den, darvoudoù koazhadel, kroc'hene ha nervel.

pyridoxino-dépendance ◇ **pyridoxindependency** ◇ **piridoksinestoue** g. Kleñved an nevezehaned naouus dre barradoù glizi kevarlank, enepkridharzus hag o steuziañ buan kenan pa vez diounezet pirodaksin, ret holl dibenndermen. Moarvat ez eus kel eus un direzh kennevidel hilel enkilek.

pyriméthamine ◇ **pyrimethamine** ◇ **pirimetamin** g. Diaminopirimidin arveret evit kurañ hag ergurañ ar baludegezh hag ivez en toksoplasmoz.

pyrimidine ◇ **pyrimidine** ◇ **pirimidin** g. Kediad nitrojenek ma tever diouto ar bazennoù pirimidek (timin, kitozin, urakil) o tasperzhiañ en amparidigezh an trenkennoù nukleek. Lies deverad pirimidek kevanaozet zo dezho ur pouez bras evel gwezherioù liaoniel ha kimiguradel (da skouer ar 5-fluoro-urakil).

pyrocatéchol ◇ **pyrocatechol** ◇ **pirokatekol** g. Korf strinkennek gounezet dre strilhañ sec'h ar c'hachou (danvezenn douhennet eus ar c'hraoñ betel). Un izomer eus ar rezorkinol eo hag arveret eo bet evel enepertzhienneg.

pyrogallol ◇ **pyrogallol** ◇ **pirogallol** g. Trihidroksibenzen arveret evel direer er c'hleñvedoù kroc'hene, ar psoriasisz ent dibarek, e rezh ogan da 5%. Pistriek kenan eo, mar bez evret.

pyrogène ◇ **pyrogen**, **pyretogenous** ◇ **gwresterus** aa. (sl. *pyrétogène*).

pyroglobuline ◇ **pyroglobulin** ◇ **piroglobulin** g. Seurtad globulin o tierc'hiñ dre dommañ, e gin ar c'hrioglobulin o tierc'hiñ dre yenaat.

pyrolyse ◇ **pyrolysis** ◇ **gwrezrannañ** Ec'haoz dindan wered ar wrez.

pyromane ◇ **pyromaniac** ◇ **tanvariad** g. -ed Tizhet gant an tanvar.

pyromanie ◇ **pyromania** ◇ **tanvar** g. Darlusk da enaouiñ tangwalloù.

pyronine ◇ **pyronin** ◇ **pironin** g. Livuzenn vazek arveret e gwiadoniezh.

pyrophobie ◇ **pyrophobia** ◇ **tanarur** g. Amgren kleñvedel rak an tan hag an tangwalloù.

pyrophosphorique : **acide** ~◇ **pyrophosphoric acid** ◇ **trenkenn b. pirofosforek** Trenkenn o tisoc'h eus kendouesadur div volekulenn drenkenn fosforek gant ezvevennadur ur volekulenn dour.

pyropoikilocytose ◇ **pyropoikilocytosis** ◇ **piropoikilokitoz** g. Kleñved dibaot ha grevus eus koc'henn an hemati, arsellet e-touez ar re Zu, a dreuzkas hêrezhel aotozomek enkilek, kiriek d'ur gwadloezañ henek rust pe rustoc'h. Devoudet eo gant sioù daskediañ ar molekul spektrin. Rekiziañ a ra adalek ar vabaniezh treuzskuilhadurioù heuliet gant ar spelc'hezvenañ. Kevredet eo ar *p.* gant un distabiled wrezel eus an hemati, e dalc'h e zreoledurioù digorvell α ar spektrin.

pyrosis ◇ **pyrosis** ◇ **piroziz** g. Santad a loskadurezh o loc'hañ eus an argreuzenn hag oc'h askennañ a-hed an treizher etrezek ar c'hargadenn. Kevret gantañ ez eus distreizhadoù treñk oc'h azonañ ur gindrehent kreuz-treizher.

pyrrole ◇ **pyrrole** ◇ **pirrol** g. Kediad heterokiklek douhennet eus an ter glaou hag eus danvezioù loenel 'zo. Un danvezenn diziouerus eo er gwadparañ.

pyrrolidine ◇ **pyrrolidine** ◇ **pirrolidin** g. Bazenn deveret eus ar pirrol.

pyruvate ◇ **pyruvate** ◇ **piruvat** g. Hal eu an drenkenn biruvek.

pyruvate-décarboxylase ◇ **pyruvate decarboxylase** ◇ **piruvat-dekarboksilaz** g. Enzim o treluskañ dekarboksiladur an drenkenn biruvek hag an treuzfurmadur anezhañ en aketaldehid. An dazgwered-se a ampar unan eus lankadoù goidigezh ar sukroù dre ar govevion, gant enaoz alkool (goiñ alkool).

pyruvicémie ◇ **pyruvaemia** ◇ **gwadvec'h g. trenkenn biruvek** Bec'h ar gwad e trenkenn biruvek.

pyruvique : **acide** ~◇ **pyruvic acid** ◇ **trenkenn b. biruvek** Trenkenn α -ketonek enaozet e-kerz kennevid ar glukidoù.

pyrvinium : **pamoate de** ~◇ **pyrvinium pamoate** ◇ **pamoat** g. **pirviniom** Livuzenn enepkest, arveret dreist holl en oksiuoz ha diounezet dre euvriñ.

pyurie ◇ **pyuria** ◇ **troazhlinegezh** b. Bezañs lin en troazh.

Q

QI ◇ **IQ** ◇ **RM** Berradur *rannad reiz*.

QR ◇ ◇ **RA** Berradur *rannad analadel*.

QS ◇ ◇ **KS** Er mestragevezhioù, berradur *kementad spirus*. Denaouiñ a ra ar c'hementad ambrougenn da azdodiñ d'ar gwezherioù (o spizañ war-lerc'h ar berradur, e gramm pe e millilitr, tolz pe ec'honad hollél an angevezh). A-wechoù e skriver ivez *KSE*, berradur *kementad spirus evit*.

quadransie ◇ **quadrantanopia** ◇ **kardangwel** g. (*hémianopsie en quadrant*).

quadrant ◇ **quadrant** ◇ **pervann** g. Hanc'her arveret el lagadouriezh evit denaouiñ pep hini eus pevar gennad ar gwelvaez.

quadrantectomie ◇ **quadrantectomy** ◇ **kardvronnezvenañ** Dazbidañ ur c'hard eus ur vronn dre benn ur c'hankr.

quadriceps ◇ **quadriceps muscle** ◇ **pevarfennek** aa. Pevar fenn dezhi, evit ar *kigenn bevarfennek ar vorzhed*.

quadricepside ◇ **quadricepsid** ◇ **pevarbroudek** aa. Gant pevar broud.

quadrige : **syndrome du ~** ◇ **Verdan's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Verdan** Diaez da blegañ ar bizied all da heul festadur surjaniel pe emdarzh eus stirenoù bleger ar biz ambidet.

quadrigémellaire ◇ **quadrigemellary** ◇ **1 pevargevellek** aa. **2 pevargevellek** aa. 1 Gantañ pevar gevell, sk. : brazedded pevargevellek. 2 A-zave da c'hevelled pevar.

quadrjumeau : **tubercule ~antérieur & postérieur** ◇ **quadrigenal bodies** ◇ **turumell** b. **grec'h & turumell draoñ** l. Tolzennoù bihan arfont en empenn an den, peder anezho : div grec'h, o kedren fiñvoù an daoulagad hag ar penn, ha div draoñ, parzhioù ar forzh kleved askennus etre ar skouarn hag ar bluskenn glevedel.

quadrjumeaux ◇ **quadrigenal** ◇ **pevargevelled** ls. (sl. *quadruplés*).

quadrilobé ◇ **quadrilobate** ◇ **pevarhoskek** aa. Gant pevar hoskad, e rummadur ar granulokit neutrofil hervez derez hoskegezh o c'hraoñell.

quadriloculaire ◇ **quadrilocular** ◇ **pederlog** aa. Gant peder log.

quadripare ◇ **quadrifera** ◇ **pevarganerez** aa. & b. A-zivout ur vaouez bet mamm da bevar bugel.

quadrifarsie ◇ **paresis of four limbs** ◇ **pevargouseizi** g. Gouseizi ar pevar ezel.

quadriflégie ◇ **quadriflegia** ◇ **pevarseizi** g. Seizi ar pevar ezel.

quadrifolaire ◇ **quadrifolar** ◇ **pevarblein** aa. Gant pevar blein.

quadrithérapie ◇ **quadritherapy** ◇ **pevaryac'haat** Yac'hadur o c'hoarvezout eus kevredadur peder elfenn, evit an haza da skouer.

quadruplés ◇ **quadruplets** ◇ **pevargevelled** l. Ar pevar gevell o tont eus an un bec'hiegezh.

qualification ◇ **qualification** ◇ **perzhegadur** g. Kevazañv gant Urzh ar Vezeion ar gwir d'ur mezeg d'ober stad eus un arbennigiezh evel un- pe dauembregour. Gounezet e vez ar perzhegadur da heul an Testeni Studi Arbennik pe ar gevataliezh anezhañ pe c'hoazh diwar ali ar C'hengor perzhegañ.

NOTENN : Merkañ amañ ar c'hemm etre an deveradoù en *-ekaat* hag en *-egañ*. An deveradoù en *-ekaat* a verk un treuzfurmadur gwerc'hel, enlenat, endra verk an deveradoù en *-egañ* un treuzfurmadur derc'hel, daveat : *galloudekaat* "dont pe lakaat da vezañ galloudek", *galloudegañ* "reiñ d'un den ar gwir da zerc'hoezañ unan all"; *gwerc'hekaat* "dont pe lakaat da vezañ gwerc'hek, eleze da gaout revoud ha gwered", *gwerc'hegañ* "emskiantañ ouzh, anaout udb. en e werc'hegezh"; heñvelda : *perzhekaat* "dont pe lakaat da vezañ perzhok, dastum perzhioù, stummadur", *perzhegañ* "anaout ar perzhioù, ar stummadur dastumet gant ub."

Deveradoù *perzhegañ* : *perzheged* g. ls. *-idi* "an hini a zo bet perzheget"; *perzhegadur* "ober pe disoc'h an ober perzhegañ".

quali-

- *qualifie une tumeur* oc'h adanviñ ur yoc'henn
- *processus de qualification* argerzh perzhegañ
- *qualifié compétent* perzheged

daouembreg • *qualifié exclusif* perzheged unembreg • *cicatrice de bonne qualité, de moins bonne qualité* kleizenn heberzh, amheberzh.

quarantaine ◇ **quarantine** ◇ **dispell** g. Prantad dredañ (40 devezh gwechall) a rank tremen an dud en arzont a vroeziou ma revez kleñvedoù tredizhus.

quarantenaire : **maladie** ~ ◇ **quarantinable disease** ◇ **kleñved** g. **dispellat** Anv roet da bep hini eus ar c'hleñvedoù a zo an holl riezoù engwiriet, dre benn ar reolennadur yec'hed etrevroadel, da gemer darbaroù gwarezerezh enep dezho (vaksinadur, dispell, h.a.) evit a sell ar veajourion o tont war o ziriad en arzont eus un rannbarzh broereuziat. Ar c'hleñvedoù poreüs eo ar re-se : kolera, bosenn, terzhienn velen, brec'h ha terzhiennoù arreadek.

quarte : **fièvre** ~ ◇ **quartan fever** ◇ **terzhienn b. bevareek** Doare terzhienn spanaus, ar barroù o tarvezout ar pevare deiz o lezel etrezo un entremez daou zevezh. — *terzhienn bevareek daou varr* pe *tri barr* (Gl. *fièvre quarte doublée* ou *triplée*) terzhienn spanaus oc'h erzerc'hañ dre daou pe dri barr terzhienn bep pevare deiz. — *terzhienn daoufarzhek* (sl. *double quarte* : *fièvre* ~).

quarteron ◇ **quadroon** ◇ **palevarzhad** g. -ed Mab un den gwenn hag ur vulzenezh, pe ur mulzen hag ur plac'h wenn.

quatrième maladie ◇ **fourth disease, Dukes' disease** ◇ **pevare kleñved** g. Kleñved Dukes-Filatow (ruzig skarlegvanek).

quatrième maladie vénérienne ◇ **fourth venereal disease** ◇ **pevare kleñved gwenerel** (sl. *Nicolas et Favre* : *maladie de* ~).

quatrième ventricule : **syndrome du** ~ ◇ ◇ **azoniad** g. **ar pevare kamb** Teskad an azonoù devoudet gant yoc'hennoù pevare kamb an empenn. Dec'h an reont ur c'haelad lemm eus al liñvenn benn-kein hag un uswask enklompennel o tedreiñ buan, a-frapadoù. Erzerc'hañ a reont dre ur c'hlopennad taer, grezvarrek, o saezhenniñ en divskoaz hag o tiloc'hekaat ar penn, a zelank pep fiñv a-daol anezhañ c'hweladoù, trolernoù pe un ezwal zoken; dre strafuilhoù ar c'hempouez el loadur war sav gant un tuadur d'an drekkorzhañ hag, anarstal, dre un dassav begennel, da dizhadur an nervennoù a-glopenn ha da strafuilhoù hirvelel. Ar yoc'hennoù-se a zedro gant ar bugel pergen, o tevoudañ un empennfoeñv.

Queckenstedt : **épreuve de** ~ ◇ **Queckenstedt-Stookey test** ◇ **prouad** g. **Queckenstedt** Prouad a c'hoarvez a greskiñ gwask al liñvenn benn-kein dre amwaskañ gwazhied ar c'herc'henn. Argemmadou ar gwask a gefled d'al liñvenn benn-kein a-hed ar ganol gevniked, nemet e ve ur skoilh. Ar prouad a gevaraez deznaouiñ ar yoc'hennoù o voustrañ ar mel, pa na stader kresk gwask ebet a-us dezho.

Queensland : **fièvre du** ~ ◇ **Q fever, Queensland fever** ◇ **terzhienn Q, terzhienn Queensland** (sl. *fièvre Q, fièvre du Queensland*).

quérulence ◇ **querulousness** ◇ **arc'hvar** g. Tuadur kleñvedel da arc'hañ.

Quervain : **maladie de De** ~ ◇ **Quervain's disease** ◇ **kleñved De Quervain** Anaez naouus 1 *ent clinique* dre ul laur hag ur valirenn vihan loet dindan stilhon ar werzhid, sezet e par stirenoù kigenn nesaer hir ha kigenn astenner berr ar meud, a zevoud ar fiñvoù anezhañ ur gouriñviad hag ur gwashadur eus al laur; 2 *ent neuziadurel* dre un tevadur kelc'hiek migornek sezet e kanol askornstirek feur ar stirenoù-se.

Quervain : **thyroïdite subaiguë de De** ~ ◇ **Quervain's thyroiditis** ◇ **skoedenno g. goulemm De Quervain** Koeñvadur ar skoedenn, strewek, leiek hag a neuz tanijennek, kevredet alies en deroù gant lauriou, terzhienn hag arouezioù skoedusvorc'h. Dedreiñ a ra etrezek ar pare en un nebeut sizhunvezhioù pe vizvezhioù. Darvezout a ra dreist holl gant ar venev eus 30 da 50 vloaz. Ent wiadoniel ez eo ur skoedenno nozelek a neuz bolc'hennvanek.

Quételet : **règle de** ~ ◇ **body mass index (BMI), Quetelet's rule** ◇ **reolenn b. Quételet** Pouez arnesadek un oadour dewerzhet e kilogramm zo par da niver ar c'hentimetroù eus e vent a-us d'ar metr. Dereat eo ar prizadur-se evit an hiniennoù a vent etre.

queue de cheval ◇ **cauda equina** ◇ **lost** g. **marc'h** Hordenn a-zerc'h amparet gant an teir gwrizienn a-loan diwezhañ, nervennoù ar groazell hag ar belost, o tiskenn dindan parzh dibenn ar mel a-livenn e kanol ar mellkein ha sac'h pilhonenn dev al livenn.

queue de cheval : **syndrome de la** ~ ◇ **cauda equina syndrome** ◇ **azoniad** g. **al lost marc'h** Stroll azonoù diwar amwaskadur nervennoù al lost marc'h. En o zouez ez eus direizhoù loc'hadel (seizi gwak kigennoù ar c'har), direizhoù santadel (nervostu a-goazez hag aneraezioù oc'h angorzhañ an izili traoñ, ar c'harbedenn hag an organoù genel), strafuilhoù teñvañ (kaheristeñv kentrat, dulaz, goulifñv kalet hag eskaroù) ha strafuilhoù kelc'hstrishaerel (andalc'h pe azdalc'h).

Queyrat : **érythroplasie de** ~ ◇ **Queyrat's erythroplasia** ◇ **eritroplaziezh b. Queyrat** Anaez rakkankrek ar glaourgennoù (muzelloù, teod, mezenn, kourzh) naouus dre ur blakenn ruz, luc'hus, hevonn, a zedro etrezek un epiteliom gourc'henngegelligel, gant c'hwarennoù kentrat.

Quick : **méthode de** ~ ◇ **Quick's method** ◇ **hentenn b. Quick** Dewerzhadur kementad ar protrombin er plasma dre vuzuliañ amzer Quick. Ar muzuliadur-se a gevaraez ivez andalañ negez ar vitamin K, rekis da furmadur ar protrombin.

Quick : **temps ou test de** ~ ◇ **Quick's test, prothrombin time, PT** ◇ **amzer Quick, prouad Quick** Pad ar c'haouediñ, e 37 °C, evit ur plasma dre azdodiñ oksalat ha neuze adrazeakaet e bezañs ur reñver tromboplastin. Ent reol e vez gavaelet amzer Quick etre 12 ha 13 eilenn. Kenfeuriek eo an uspad anezhi da isvec'h ar protrombin, hag ivez da vec'hioù ar proakelerin, ar prokonvertin hag ar barenn Stuart.

quinacrine ◇ **quinacrine** ◇ **kinakrin** *g.* Deverad an akridin arveret evel enepaludeg hag evel tenialazher. En arbenn eus e weredoù pistriel e vez an arver anezhañ argrenn kenan hiziv.

Quincke : **maladie** ou **œdème de** ~ ◇ **Quincke's disease** or **oedema** ◇ **kleñved** pe **gouliñv** **Quincke** Seurtad linadell naous dre ur gouliñv o tinodiñ trumm ha sezet war an dremm, ar gouzoug hag a-wechoù ar c'harc'henn (ent dibarek er furn hêrezhel). Devoudet eo ar c'hleñved gant un erwezha a rizh darwalladel. Er furn hêrezhel, treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, ez eus ur skorted eus ezniñver kedrann gentañ ar glokaenn vlivaet (C₁).

Quincke : **méthode de** ~ ◇ **Quincke's method** ◇ **hentenn** *b.* **Quincke** Kalvezder evit ar gwehenniñ loadurel (sl. *drainage*).

Quincke : **signe** ou **pouls de** ~ ◇ **Quincke's pulse** ◇ **arouez** *b.* pe **poulz** **Quincke** Poulz korrwazhiedel amparet gant pebeiladurioù gwelveder ha ruzder a-gellusk gant ar sistoloù kalon, arsellet dindan an ivin goude bezañ bet amwasket skañv, e-kerz ar skorted aortek (sl. *pouls capillaire*).

quinidine ◇ **quinidine** ◇ **kinidin** *g.* Alkaloid douhennet eus ar c'hinkina, izomer ar c'hinin. Leteñvel eo e berzhioù lianiñvel ouzh re ar c'hinin. En arbenn eus e wered kreñv evit leiaat broudadusted ar c'haer kalon hag an tredanren kentez-kofig e vez arveret ar c'hinidin e rezh sulfat e mezegadur migorvezioù 'zo (dizarbenn an adfeilloù) hag e degouezh kalonustead kofig hag uskofig.

quinidine-like : **effet** ~ ◇ **gwered** *g.* **kinidinvanek** Gwered un danvezenn heñvel ouzh hini ar c'hinidin. Bomm arveret da zeanviñ gwered an aroustalerioù koc'henn, ar c'hinidin o vezañ rizh ar rumm-se a enepmigorvezeier.

quinidinémie ◇ **quinidinemia** ◇ **kinidinwadvec'h** *g.* Bec'h ar c'hinidin er gwad, lia enepmigorvez. E-doug ur prederiadur emañ ar bec'h er gavael 1, 5 – 3 µg/mL pe 4, 6 – 9, 2 µmol/l. An doenadoù pistriel a sav ar gwadvec'h kinidin da 5 – 6 µg/mL pe 15, 4 – 18, 5 µmol/mL.

quinine ◇ **quinine** ◇ **kinin** *g.* Pennalkaloid ar rusk kinkina. Danvezenn wenn, c'hwerv kenan he saour. Euvret a zoenadoù bihan e kenraou an nerved hag e c'horreka ar poulz; a zoenadoù brasoc'h e tarwazh an empenn, e leia broudadusted damougek ar mel a-livenn hag a izela terzhienn ar glañvourion wresterek. Diounezet e vez da brederiañ ar baludegezh (ar baludegezh diwar *Plasmodium falciparum* pergen), ez eo ar gwezher spesadel anezhi. Arveret e vez ivez evel enepterzhienneg hag enep ar glazoù. Diounezet e vez e rezh halioù hepken : klorhidrat, sulfat, h.a., benzoat ha glukonat.

quinine : **test à la** ~ ◇ **quinine test** ◇ **prouad** *g.* **a' r c'hinin** Prouad amkanet da zinoñ furmoù leiek a viasteniezh : euvradur doenadoù bihan kinin a vuia ar gaherasikted.

quininisation ou **quinisation** ◇ **quinization** ◇ **kininañ** Arver yac'hadel ar c'hinin, ent dibarek evel mezegadur ergurañ en taredoù m'emañ ar baludegezh o vroreuziañ.

quininisme ou **quinisme** ◇ **quininism** ◇ **kininegezh** *b.* Pistriadur gant an halioù kinin, naous dre ur glopennost, fraoñvad-ennoù divskouarn, ur vouzarded dibad hag erzerc'hadoù empenn.

quinique ◇ **quinic** ◇ **kininel** *aa.* A-zave d'ar c'hinin pe d'ar c'hinkina, sk. *mezvadur kininel*.

quinisocaïne ◇ **dimethisoquin** ◇ **kinizokain** *g.* Dieraezer lec'hiek, anvet ivez *dimetizokin*, arveret e rezh ogan e degouezh debrom.

quinoléine ◇ **quinoline** ◇ **kinolein** *g.* Kediad heterokiklek aromatek douhennet eus an ter glaou, dezhañ perzhioù dilestus hag enepterzhienn. Arveret e vez ar c'h. hag e zeveradoù evel enepaludeier.

quinolone ◇ **quinolone** ◇ **kinolon** *g.* Stroll enepbakterieier kevanaozel deveret diouzh ar 4-okso-1-4-dihidrokinolein. Ar c'hediad kentañ arveret a voe an drenkenn nalidiksek. Ar pefloksakin, an ofloksakin hag an norfloksakin zo kinolonou nevez, anvet fluorokinolonou, arveret kenan.

quinovine ◇ **quinovin** ◇ **kinovin** *g.* Glukozid c'hwerv ar c'hinkina.

Quinquaud : **folliculite décalvante de** ~ ◇ **folliculitis decalvans** ◇ **bolc'hennfo** *g.* **moalaus Quinquaud** Bolc'hennfo linus ar vrigenn o tevoudañ an diwaoutad kantet.

quinquina ◇ **quinquina**, **cinchona** ◇ **kinkina** *g.* Rusk ar gwez eus ar genad *Chinchona*, eus kerentiad ar Rubiaceged, a orin suamerikat. Er c'h. e kaver lies alkaloid, ar re bennañ o vezañ ar c'hinin, ar c'hinidin, ar c'hinkonin hag ar c'hinkonidin. Usreüs, krezus ha diderzhiennus eo ar c'hinkina. Arveret e vez e lies rezh : poultr, douhennad, tentur, meizhiadur, siroz, gwinn, h.a. — *kinkina* louet (Sz. *grey quinquina*) : anv lies kinkina a spesadoù kevarall, *Cinchona condominea*, *Cinchona scrobiculata*, h.a., louet al liv anezho, enno nebeud a ginin hag ur c'hementad brasoc'h a kinkonin. — *kinkina melen* (Sz. *yellow quinquina*) : anv lies kinkina arveret an aliesañ, douhennet eus ar spesadoù *Cinchona calisaya*, *C. micrantha*, h.a., enno ar c'hementad brasañ a ginin. — *kinkina ruz* (Sz. *red cinchona*) : anv lies kinkina a spesadoù kevarall, *Cinchona succirubra* dreist holl, etreat o gwered da hini ar c'hinkinaoù louet ha da hini ar c'hinkinaoù melen.

quintane ◇ **quintan** ◇ **pempvedek** *aa.* A-zivout an terzhiennoù spanaus a adkrog ar barradoù anezho ar pempvet deiz.

quinte ◇ **coughing fit** ◇ **kaouad** *b.* **paz** Barrad paz a-bad. En orin e oa “paz ar bempvet eur diouzh ar beure”, deskrivet gwechall gant an dorzhelleion. Bremañ e ra dave da gaouad paz rizhek an drev.

quintuplés ◇ **quintuplets** ◇ **pempgevelled** *l.* Ar pemp gevell o tont eus an un bec'hiegezh.

quintus varus supradductus ◇ **quintus varus** ◇ **quintus varus supradductus** Gwariadur enganet pe arzeuat eus ar pempvet biz troad, war ziabarzh ha war grec'h, a-us d'ar pevare.

quotidienne : fièvre ~ ◇ **quotidian fever** ◇ **terzhienn** b. **bemdeziek** Furm terzhienn spanaus gant barradoù o tistreiñ bemdez. Bez' ez eo *pemdeziek unvarr*; *daouvarr*; *tribarr*, hervez niver ar barradoù pemdeziek.

quotient albumineux du sérum ◇ **albumin-globulin quotient** ◇ **rannad g. albumin-globulin ar gwadveiz** Keñver ar gwadveiz-albumin war ar gwadveiz-globulin, gavaelet ent reol etre 1,5 ha 2.

quotient calorique ◇ **caloric quotient** ◇ **rannad g. gwrezadel** Rannad jedet dre rannañ ar wrezad (e cal) dedaolet e-kerz un argerzh kennevidel dre ar c'hementad oksigen (e mg) rekis evit dilaoskiñ ar wrezad-se.

quotient intellectuel ◇ **intelligence quotient** ◇ **rannad g. reiz** Andalad ar reiz jedet dre rannañ oad reiz ar gouzrec'h, andalet dre skeul Binet-Simon pe ur prouad all skoueriekaet, dre an oad gwerc'hel hag o liesaat an disoc'h dre 100.

quotient respiratoire ◇ **respiratory quotient** ◇ **rannad g. analadel** Keñver etre an ec'honad dioksidenn garbon ezvevennet hag an ec'honad oksigen bevezet e-doug an amzer-se. Ent reol ez eo ar c'heñver-se nes da 0,9.

R

R ◇ **R** ◇ **R** 1 Arouez ar röntgen, unanenn a wechall evit muzuliañ an doenadoù ardirzh ouzh ar skinoù X ha γ hag erlec'hiet outi bremañ ar C/kg (koulomb dre gilogramm). 2 Arouez ar rannad analadel.

R : **onde** ~ ◇ **R wave** ◇ **gwagenn b. R** (sl. *électrocardiogramme*).

Ra ~ ◇ **Ra** ◇ **Ra** Arouez kimiek ar radiom.

RAA ◇ ◇ **RLA** Berradur “remm lemm an arzoù”.

Raab : **syndrome de** ~ ◇ **Raab's syndrome** ◇ **azoniad g. Raab** Kevreted ur borlder, ur bouc'hwel amheol, ul luc'hsaefo livegennek ha strafuilhoù bred.

rabique ◇ **rabic** ◇ **1 konnarek aa. 2 ~konnar, konnarel aa. 3 konnareg g. -eion** 1 Gant ar gonnar. 2 A-zave d'ar gonnar. 3 Gouziviad gant ar gonnar.

rabot : **signe du** ~ ◇ **plane sign** ◇ **arouez b. ar rabot** Tarav laurus ar padelleg war an talbenn, arouez a artroz padelleg-morzhed (sl. *fémoro-patellaire : syndrome* ~, *syndrome rotulien*).

Rabson-Mendenhall : **syndrome de** ~ ◇ **Rabson-Mendenhall syndrome** ◇ **azoniad g. Rabson-Mendenhall** Anaev treuzkaset er mod aotozomek enkilek o c'hoarvezout eus un diabet insulinharzus ha kammneuziadoù diseurt : usteñv ar c'hourjadenn hag ar gaenuslounezhenn, kammneuziadoù dent, un tal balirek hag un *acanthosis nigricans*.

race ◇ **race** ◇ **gouenn b., gouennad b.** Stroll hiniannoù o tiforc'hekaat diouzh ar strolloù all eus an un spesad dre un teskad doareannoù hêrezhel boutin (neuziadurel, korfadurel, gwadveizel, h.a.). Arzaelet kenan eo ar c'heal-se evit a sell an denion.

racémeux ◇ **racemose** ◇ **blokadek aa.** E stumm ur blokad.

racémique ◇ **racemic** ◇ **rakemek aa.** A-zivout ur meskad keitvol a eniantomeroù (izomeroù drec'hel), mannel ar c'hwelusted.

racémisation ◇ **racemization** ◇ **rakemekaat** Treuzfurmiñ ur c'hediad c'hwelus en ur c'hediad rakemek.

rachialgie ◇ **rachiodynia** ◇ **livennost b.** Laur sezet el livenn.

rachianalgésie ou **rachianesthésie** ◇ **spinal analgesia, spinal anesthesia** ◇ **livenndic'hostañ pe livenndieraeziñ** Dieraeziñ parzh izelañ ar c'horf, dre ensinklañ er gavenn endan-gevnidek, dre ezwanañ a-loan, un diaraezer.

rachianesthésie générale ◇ **general spinal anesthesia** ◇ **livenndieraeziñ hollek** Dedalvezadur al livenndieraeziñ d'an holl wezhiadennoù embreget war ar penn, ar c'hef hag an izili, dre ober an ensinkladenn e liveoù uhel a-walc'h eus kanol ar mellkein.

rachianesthésie hyperbare ◇ **hyperbaric spinal anesthesia** ◇ **livenndieraeziñ uc'hamwask** Dieraeziñ a-livenn dewerc'het dre ensinklañ un nebeut mililitroù eus un dileizhenn diaraeziñ nebeutoc'h doues eget al liñvenn benn-kein. An dileizhenn-se a lusk etrezek ar rannbarzhioù dianaou, pezh a gevararez, dre gemmañ savlec'hioù ar gouziviad oberataet, diaraeziñ rannbarzhioù loet uhel pe uheloc'h.

rachianesthésie hypobare ◇ **hypobaric spinal anesthesia** ◇ **livenndieraeziñ isamwask** Dieraeziñ a-livenn dewerc'het dre ensinklañ un nebeut mililitroù eus un dileizhenn diaraeziñ nebeutoc'h doues eget al liñvenn benn-kein. An dileizhenn-se a lusk etrezek ar rannbarzhioù uhel eus ar gavenn endan-gevnidek hag an dasparzh anezhi a vez reolet dre argemmañ savlec'h ar gouziviad oberataet.

rachianesthésie isobare ◇ **isobaric spinal anesthesia** ◇ **livenndieraeziñ keidamwask** Dieraeziñ a-livenn dewerc'het dre ensinklañ un ec'honad bras a-walc'h (etre 10 ha 20 mL) eus un dileizhenn diaraeziñ a un douester gant al liñvenn benn-kein. Astenn an dachenn diaraezet zo diouzh an ec'honad ensinklet.

rachicentèse ◇ **rachicentesis, lumbar puncture** ◇ **livennezwanañ** Sankañ ur broskan moan etre div wareg vellenn, ar peurliesañ e live al livenn dargreiz (ezwanañ a-loan Quincke, 1891), e sell da ziskargañ, hep suc'hañ, al liñvenn benn-kein pe da ensinklañ ul lia pe un aozad dargemm.

rachidien ◇ **spinal, rachidial, rachidian** ◇ **a-livenn aa., mellannel aa., mellkeinell aa., livennel aa.** A-zave d'al livenn (gein), eleze d'ar mellkein ha d'ar mellennoù.

rachis ◇ **vertebral column** ◇ **livenn b. gein, mellkein g.** Livenn amparet gant mellennoù ar gouzoug, ar bruskg hag an dargreiz, ar groazell hag ar belost.

rachischisis ◇ **rachischisis** ◇ **rachiskiziz g. pe livennvizid g.** Skarr ganedigel, darnel pe hollel, al livenn (sl. *myélodysraphie, hydrorachis, spina bifida*).

rachitigène ◇ **rachitogenic** ◇ **lec'heiat aa.** O tevoudañ pe o kevarezañ al lec'h.

rachitique ◇ **rachitic** ◇ **1 ~lec'h, lec'hel aa. 2 lec'hek aa. 3 lec'heg g. -eion** 1 A-zave d'al lec'h. 2 Gant al lec'h. 3 Gouziviad gant al lec'h.

rachitisme ◇ **rickets** ◇ **lec'h g.** Kleñved ar c'hreskevzh, hogos bepred diwar un negez vitamin D, petra bennak ma c'hellfe bezañ e diazalc'h gant lies daralladur kennevid ar c'halkiom hag ar fosfor (lec'h vitaminharzus). Naouiñ a ra ent klinikel dre azonoù askornel (disneuziadur ar c'hlopenn, kloppennvloodad, feunteunig ledanaet, paterennoù brennid, baliregezh an ufern, gourlaoskegezh ar c'henvelloù, ur c'haberstant, hag ivez un tuadur d'ar skeventadoù ha d'ar poreadoù arreat.

rachitisme fœtal ◇ **fetal rickets** ◇ **lec'h ar grouell** (sl. *achondrplasie*).

rachitisme hémorragique ◇ **infantile scurvy** ◇ **lec'h gwadliñvel** (sl. *scorbut infantile*).

rachitisme hypophosphatémique familial ◇ **hypophosphatemic familial rickets** ◇ **lec'h fosfatisvec'hel familhel** Anez hêrezhel treuzkaset er mod trec'hek revereet. Erzerc'haat a ra dre ul lec'h garv, vitaminDharzus, o tinodiñ war-dro an oad a 2 – 3 bloaz, gant ur fosfatwadisvec'h, ur fosfatatroazhusvec'h hag ur fosfatatzwadisvec'h. E devoud ur gorrde heneuz eo.

rachitisme tardif ◇ **late rickets** ◇ **lec'h diwezhat** Lec'h o tarvezout gant ar bugel bras ha gant ar c'hrennard heñvel ouzh al lec'h gwir.

rachitome ◇ **rachitome** ◇ **mellenbener g. -ioù** Benveg evit digeriñ kanol ar mellkein hep anafañ ar mel da-geñver ar c'helanskejañ.

rachitomie ◇ **rachiotomy, rachitomy** ◇ **mellenbenañ** Flañchañ ur vellenn pe ar mellkein.

racine ◇ **root** ◇ **gwrizienn b.** Er gorfadurezh, orin ul luniad (da skouer : gwrizienn nerverl) pe parzh oc'h amparañ an diaz, al lec'h englañ eus un organ (da skouer : gwrizienn un dant).

racine

- *racine antérieure des nerfs rachidiens* gwrizienn a-dor an nervernoù a-livenn
- *racine bulbaire du spinal* gwrizienn a-glopenn an adnervenn
- *racine cochléaire du nerf auditif* gwrizienn izelañ an nervern gempouez-kleved
- *racine courte (motrice) du ganglion ophtalmique* gwrizienn loc'hañ lagad kangrenn ar saeoù
- *racine de l'hélix* gar ar gourem
- *racine de la dent* gwrizienn an dant
- *racine de la verge* gwrizienn ar c'halc'h
- *racine des corps caverneux* gwrizienn ar c'halc'h
- *racine descendante du trijumeau* stroad a-livenn an nervern drigevell
- *racine du mésentère* gwrizienn ar gandedenn
- *racine du nez* gwrizienn ar fri
- *racine externe du nerf médian* gwrizienn gostezel an nervern greizer
- *racine interne du nerf médian* gwrizienn greizel an nervern greizer
- *racine longue (sensitive) du ganglion ophtalmique* barr treuzkiz an nervern fri-saeoù da gangrenn ar saeoù
- *racine médullaire du spinal* gwrizienn a-livenn an adnervenn
- *racine motrice du nerf facial* nervern an dremm
- *racine motrice du trijumeau* rann vihan an nervern drigevell
- *racine olfactive* rizen ar c'hwesh
- *racine postérieure des nerfs rachidiens* gwrizienn a-gein an nervernoù a-livenn
- *racine sensitive du facial* nervern etreat
- *racine sensitive du trijumeau* rann vras an nervern drigevell
- *racine sympathique du ganglion ophtalmique* barr simpatek da gangrenn ar saeoù.

Racine : syndrome de ~ ◇ **Racine's syndrome, premenstrual sialorrhœa** ◇ **azoniad g. Racine** Azoniad halusvorc'h rakviziaouel : koeñv rakviziaouel ar gwagrennoù halviñ hag ar gwagrennoù bronn, etre pevar ha pemp devezh kent donedigezh ar mizioù.

rad ◇ **rad** ◇ **rad g.** Gwechall, unanenn doead skinad ionaus luget erlec'hiet outi hiziv ar gray (Gy) er reizhiad etrevroadel, 1 rad = 0, 01 Gy (sl. *gray*).

radar : **ondes ~** ◇ **radar waves** ◇ **gwagennoù radar** Gwagennoù tredanwarel traberr (kentimetrek) o tec'han er bevedeg un astommañ eus ar gwiadou.

Rademacher : syndrome de ~ ◇ **Rademacher's syndrome** ◇ **azoniad g. Rademacher** Teskad direizhoù arsellet gant ar vagadell, diwar un hangaezivig : poreadoù diseurt adfeilhus, c'hwarrennoù, γ -globulinwadisvec'h. Ar peurliesañ e tedro etrezek ar marv.

radial ◇ **radial** ◇ **1 ~gwerzhid, a-werzhid 2 war werzhid** 1 A-zave d'ar werzhid, da skouer :

- *artère des épicondyles* talmerenn gilreder a-werzhid
- *artère interosseuse du premier espace de la main* talmerenn a-werzhid ar biz yod
- *artère radiale* talmerenn a-werzhid
- *artère récurrente radiale antérieure* talmerenn gilreder a-werzhid
- *artère récurrente radiale postérieure* talmerenn gilreder etreeskernel
- *articulation huméro-radiale* kenvell paler-gwerzhid
- *branche antérieure du nerf radial* barr bas an nervern a-werzhid
- *branche postérieure du nerf radial* barr don an nervern a-werzhid
- *branche terminale antérieure du nerf radial* barr bas an nervern a-werzhid
- *branche terminale postérieure du nerf radial* barr don an nervern a-werzhid
- *chef radial du fléchisseur commun superficiel* penn a-werzhid (ar pleger boutin bas)
- *fossette radiale* poull ar werzhid
- *gaine des radiaux* gouin stirenoù astennerioù a-werzhid an arzorn
- *gouttière radiale* nant an nervern a-werzhid
- *muscle court radial* kigenn astenner berr a-werzhid an arzorn
- *muscle deuxième radial* kigenn astenner berr a-werzhid
- *muscle premier radial* kigenn astenner a-werzhid an arzorn
- *nerf radial* nervern a-werzhid.

2 Etrezek ar werzhid, sk. : *stouiñ war werzhid*.

radiance ◇ **radiant flux** ◇ **1 luc'hgaster g. gorreel 2 gremmgaster gorreel** 1 Rannad al luc'hgas ec'hodet gant ur c'horreenn dre ar gorread anezhi, dewerzhet e lumen.m^{-2} , anvet ivez *luks*. 2 Rannad ar gremmgas ec'hodet gant ur c'horreenn dre ar gorread anezhi, dewerzhet e w.m^{-2} (watt dre metr karrez).

radiation ¹ ◇ **radiation** ◇ **skinad g.** Dezoug gremm ha fiñvad er goulo pe en ur metoù danvezel. Kemm a lakaer etre ar *skinadoù gwagennel* a c'hoarvez hep dezougerezh danvez (gwagennoù dastennel ha tredanwarel) hag ar *skinadoù rannigel*, o treledañ e rezh rannigoù dezho un tolz (skinadoù α , β , da skouer). Evit ar *skinadoù ionaus* zo skinadoù rannigoù pe foton, dezho gremm a-walc'h da ionaat ar molekul pe an atom eus ar metoù ma treledont (sl. *gray*).

radiation ² ◇ **radiation** ◇ **saezhennadur g.** Hordenn gwiennoù, da skouer : — *saezhennadur a-gleved* (Gl. *radiation auditive*, Sz. *acoustic radiation*), hordenn gwiennoù eus parzh adreñv ar pourc'had diabarzh, a emastenn eus ar c'horf klinek kreizel d'an troennoù ividig treuz; — *saezhennadur a-weled* (Gl. *radiation optique*, Sz. *optic radiation*), hordenn gwiennoù nerverl o vont eus an derc'hvel da greizenn a-weled an dolbezenn gilpenn; — *saezhennadur a-zerc'hvel* (Gl. *radiation thalamique*, Sz. *thalamocortical fiber*; *peduncle of thalamus*), hordenn gwiennoù oc'h eren an derc'hvel da bluskenn an empenn.

radical ◇ **radical** ◇ **bonad g.** E kimiezh, stroll atom dezhañ un hinienned piauouel a c'hell daperzhiañ en un dazgwered kimiek evel un atomenn unel. Da skouer : bonad metil –CH₃, bonad –COOH an trenkennoù bevel.

radical acide ◇ **acide radical** ◇ **bonad trenkek** Stroll tredanleiel dec'hanet diwar un drenkenn kollet ganti un pe lies proton H⁺, pe diwar un hal tredanrannet.

radical libre ◇ **free radical** ◇ **bonad rez** Bonad kimiek kediedik kenan en araez da zevoudañ anafoù kelligel. Herzal a ra molekul 'zo (vitamin A, E, h.a.) ouzh ar gwered-se (bonadrezharzerioù, eneboksiderioù).

radicotomie (sl. *rhizotomie*).

radiculaire ◇ radicalar ◇ gwizienn, a-wrzienn; gwiziennel aa. A-zave d'ar gwiziennoù nerverl, da wrziennoù an dent.

radiculaire : syndrome ~ ◇ **radicular syndrome** ◇ **azoniad g. gwiziennel** Teskad an azonoù devoudet gant daralladur ar gwiziennoù a-livenn. Tizhad ar wrzienn a-dor pe ar wrzienn loc'hañ a zevoud ur seizi gant isteñv (*a. g. loc'hadel*); tizhad ur wrzienn a-gein pe ur wrzienn santout a zevoud un *a. g. santadel* : 1 hegadel (laurioù) pa vez heget ar wrzienn, 2 divigadel (aneraez) pa vez distrujet.

radicologie ◇ **radicologia** ◇ **gwiziennost b.** Laur boud ha diastal, dastroc'het gant grezvarroù taer diwar hegadur pe danijenn gwiziennoù an nervernoù a-glopenn pe an nervernoù a-livenn. Azonañ a ra alies deroù ar gwiziennfo.

radiculectomie ◇ **radicectomy** ◇ **gwiziennezvenañ b.** Gouvenañ ur wrzienn nerverl, ur wrzienn nerverl a-livenn pergen.

radiculite ◇ **radiculitis** ◇ **gwiziennfo g.** Tanienn gwiziennoù an nervernoù a-glopenn pe an nervernoù a-livenn, devoudet gant un arbenn treloc'hel (amwask gant ur yoc'henn, ur pugnez, un darvoll) pe pistriboreel. Naouus eo dreist holl dre strafuilhoù ar santout a c'hlenad gwiziennel (laurioù, sl. *gwiziennost*; kemenerion, aneraez), hag a-wechoù dre zireizhoù loc'hadel (gouseizi gant kaeristeñv), dre leiadur an damougoù ha dre strafuilhoù tederad.

radiculocordonal postérieur : syndrome ~ ◇ **posterior cord syndrome** ◇ **azoniad g. gwiziennel pañsel adreñv** Teskad ar strafuilhoù o kevredañ anafoù pañsoù adreñv ha gwiziennoù a-gein ar mel a-livenn. Arsellet en tabez dreist holl.

radiculographie ◇ **radiculography** ◇ **gwiziennluniñ** Skinluniñ goude bezañ ensinklet un aozad dargemm dourzileizh er gavenn endan-gevnidek. Dewerc'het e vez an ensinkladenn goude dieraeziñ al livenn; an aozad dargemm a voul an aspleg tevel ha feurioù ar gwiziennoù a-livenn.

radiculopathie ◇ **radiculopathy** ◇ **gwiziennad b., gwiziennanaez g.** Nep anaez ar gwiziennoù nerverl.

radié ◇ **radiate** ◇ **saezhennek aa.; saezhennus aa.** Gant linennoù o saezhenñi adalek ur poent kreiz.

radioactif ◇ **radioactive** ◇ **skinoberiek aa.** Gant ar perzh da ec'hodiñ skinadoù ionaus.

radioactivité ◇ **radioactivity** ◇ **skinoberiegezh b.** Perzh ar c'horfoù skinoberiek, evel an uraniom, ar radiom, h.a. Naturel pe galvezadel eo ar c'horfoù skinoberiek, ar re ziwec'hañ dec'hanet dre vombezañ atom gant rannigoù (proton, neutron, h.a.) pe gant skinadoù tredanwarel.

radiobiologie ◇ **radiobiology** ◇ **skinvevoniezh b.** Skourr ar vevoniezh o studiañ gweredoù ar skinadoù ionaus war ar gwiadoù bev.

radicalcium ◇ **radicalcium** ◇ **skingalkiom g.** ⁴⁵Ca, stabilañ skinizotop kalvezadel ar c'halkiom, dezhañ un hanterhoali a 163 deiz. Arveret e vez e studi kennevid ar c'halkiom.

radiocarbone ◇ **radiocarbon** ◇ **skingarbon g.** ¹⁴C, skinizotop ar c'harbon.

radiocardiogramme ◇ **radiocardiogram** ◇ **γ-kalonlunad g., gammalunad ar galon, kalonskingannlunad b.** Krommenn treset diwar-bouez ar γ-kalonluniñ.

radiocardiographie ◇ **radiocardiography** ◇ **kalonluniñ izotopek, gammaluniñ ar galon, γ-kalonluniñ, kalonluniñ skingann** Imbourc'h gwadloc'honiell diazezet war studi krommenn danaviñ, e kavennoù ar galon, un danvezenn skinoberiek ec'hoder ur skinad γ (gwadvez-albumin denel tiellet gant iod 131 pe iod 132) ensinklet er wazhienn endan-drebez. Tremen an danvezenn skinoberiek-se er c'hofig dehou, ha goude er c'hofig kleiz a lerc'hwezer dre araez ur c'honter dre skingannañ sezet war ar gorread argalonel. Ar grommenn dreset a gevaraez studiañ arc'hwel pep hini eus ar c'hofigoù, an amred skeventel hag ec'hongas ar galon. Ouzhpenn an danvezennou engwazhiennel-se hag a gevaraez studiañ an anadennoù gwadloc'honiell, danvezennou tiellet all a bourchas ur skingannlunad eus ar c'halonkaer. Ar c'hation unamsavus (kaliom 43, taliom 201) a ya da lenañ war ar gigenn vonan hag un tachad amfuet a roy ur skeudenn loezennek; en enep, an tachad-se a vo naouaet war-eeun dre arverañ tielleroù “lenidik ouzh angwaziadoù” (pirofosfat teknetium 99m, m evit *manstabil*). A-c'houde 1972, bennozh d'an arakadennoù kalvezel (kameraoù dre skingann herrek kevredet gant riñverezed, γ-haenluniñ), skeudennou divvent arreat o deus kevaraezet studi dialuskel dik arc'hwelioù ar galon.

radiochimie ◇ **radiochemistry** ◇ **skingimiezh b.** Skourr ar gimiezh o plediñ gant ar gweredoù kimiek dec'hanet gant ar skinadoù.

- radiocinématographie** ◇ **radiocinematography** ◇ **skinfiñvluniñ** Lerc'hwezañ dre skinluniñ fiñvoù organoù 'zo — ar galon hag ar gwazhied, da skouer — diwar-bouez ar skedamplaer. — *s. war eeun* : louc'hañ war eeun ar goc'henn fiñvluniñ gant ar skinoù X. — *s. ameeun* : fiñvluniñ ar skeudenn dewerc'het war un hewel skinsell ha dargemmaet diwar-bouez ur skedamplaer.
- radiodermite** ◇ **radiodermatitis** ◇ **skingroc'henfo** *g.* Teskad an anafoù kroc'hen ha glaourgenn devoudet gant ar skinoù X pe skinadoù ionaus all (sl. *dermite des rayons X, radiodermite*).
- radiodiagnostic** ◇ **radiodiagnosis** ◇ **skindeznaouiñ** Deznaou savelet diwar-bouez skinimbourc'hoù.
- radioélément** ◇ **radioelement** ◇ **skinelfenn** *b.* Elfenn gimiek skinoberiek, na pa ve naturel pe galvezadel. Skinelfennoù berrhoali 'zo (iod, teknetiom, da skouer) a vez kenderc'het ent kalvezadel evit talvezout evel tielleroù. Reoù all, hirhoali (kobalt, da skouer) a dalvez da vammenn skinoberiek kreñv arveret er c'hurañ (kobaltkurañ, da skouer).
- radioépidermite** ◇ **radioepidermitis** ◇ **skinezkroc'henfo** *g.* Teskad an anafoù ezkroc'hen devoudet gant ar skinoù X pe skinadoù ionaus all.
- radioépithélioma** ◇ **X-ray carcinoma** ◇ **skinepiteliom** *g.* Epiteliom devoudet gant skinadoù ionaus.
- radiofréquence** ◇ **radiofrequency** ◇ **skindalm** *g.* Talm ur wagenn dredanwarel. Ar skindalmoù n'o deus ket paouezet a greskiñ, eus 0,15 da 100 MHz. O arverañ a reer er yac'hadouriezh gant ar pal distrujañ gwiadoù dre wreziñ : tredanerc'hel (sl. *tredangaoulediñ, gwrezkaoulediñ*), en hentennoù ezvenañ ar rehentoù enkalonel hag en dason gwarellec'het derc'hanel da gaout un advant spin.
- radiogène** ◇ **radiogenic** ◇ **1 skinc'haner** *aa.* **2 skinien** *aa.* 1 Oc'h ec'hodiñ skinoù X. 2 Devoudet gant ar skinoù X.
- radiogramme** ◇ **radiogram** ◇ **skinlun** *g., skinlunad* *g.* Luc'hskeudenn dewerc'het dre ar skinoù X.
- radiographie** ◇ **radiography** ◇ **1 skinluniñ** **2 skinlun** *g., skinlunad* *g.* 1 Kalvezerezh lerc'hwezañ, war ur gorre luc'hkizidik, ur parzh eus ar c'horf en ardizh ar skinoù X. 2 Anv roet d'ar skeudenn dewerc'het.
- radio-immunoanalyse** ◇ **radioimmunoassay** ◇ **skinhangaelfennañ** Hentenn elfennañ a-gevez resis kenan diazezet war erwezh daou antigen unrezh (unan anezho o vezañ tiellet gant ur skinizotop) ouzh o antikorfoù. Arveret e vez er vezekniezh evit savelañ bec'h an hormonoù, an antigenoù, al liaoù, h.a., er gwad, en troazh pe al liñvennoù bevedel all.
- radio-immunochimie** ◇ **radioimmunochemistry** ◇ **skinhangaegimiezh** *b.* Kalvezder dezventañ dreistkizidik diwar-bouez ur skinizotop. C'hoarvezout a ra eus : ar skinhangaeskignañ, ar skinhangaedredannizhañ, ar skinhangaeezventañ hag ar skinhangaezierc'hiñ.
- radio-immunodiffusion** ◇ **radioimmunodiffusion** ◇ **skinhangaeskignañ** Seurtad hangaeskignañ kizidik kenan, ma arverer un antikorff gwadveizel tiellet gant un izotop skinoberiek.
- radio-immuno-électrophorèse** ◇ **radioimmuno-electrophoresis** ◇ **skinhangaedredannizhañ** Seurtad hangaedredannizhañ kizidik kenan, ma arverer un antikorff tiellet gant un izotop skinoberiek.
- radio-immunologique** : **méthode** ~ ◇ **radioimmunoassay, RIA** ◇ **hentenn** *b.* **skinhangaee** Araezad kizidik kenan ha gourres evit dezventañ an hormonoù peptidek ha dre vras tost an holl antigenoù. C'hoarvezout a ra a lakaat e kendiraez, e kenfeurioù roet, al liñvenn vevedel gant an antigen enni hag un hangaegemplezh hezileizh furmet diwar an kez antigen tiellet gant un izotop skinoberiek ha diwar an antikorff keñverek. An antigen da zezventañ a ya da lenañ ouzh an antikorff, o tilec'hiañ ur c'hementad antigen tiellet, seul vrasoc'h ma 'z eo paotoc'h eñ e unan. Saveladur kenfeurioù ketep an antigen skinoberiek lenet ha dilaosket (dispartiet dre lies araezad : tredannizhañ, lenañ war rousinoù ioneskemmer, h.a.), keñveriet ouzh krommennoù test savelet gant doenadoù anavezet an hevelep antigen stalon, a gevaraezo gounit ar c'hementad antigen endalc'het el liñvenn vevedel studiet. An un araezad a vez arveret da zezventañ an antikorfoù.
- radio-immunoprécipitation (RIPA)** ◇ **Radiolmmunoprecipitation Assay, RIPA** ◇ **skinhangaezierc'hiñ** Kalvezder elfennañ hangaeele o c'hoarvezout a zispartiañ proteinoù, viruzel da skouer, dre dredannizhañ, tiellet dre un amindrenkenn skinoberiek, goude o dierc'hadur dre an antikorfoù keñverek.
- radio-isotope** ◇ **radioisotope** ◇ **skinizotop** *g.* Izotop skinoberiek.
- radio-isotopographie** ◇ **radioisotopography** ◇ **skinizotopluniñ** Louc'hañ ur film luc'hskeudenniñ gant un organ ennañ skinizotopoù.
- radiokymographie** ◇ **radiokymography** ◇ **radiokimografiñ** Kalvezder lerc'hwezañ dre skinluniñ fiñvoù un organ (kalon, skevent).
- radiolabile** ◇ **radiolabile** ◇ **skineizik** *aa.* Kizidik ouzh gwered ar skinadoù ionaus.
- radiolésion** ◇ **radiolesion** ◇ **skinanaf** *g.* Nep anaf devoudet gant un ardizh ouzh ar skinadoù ionaus (sl. *mal des rayons*).
- radioleucémie, radioleucose** ◇ **radio-induced leukemia** ◇ **skinleukemiezh** *b.* Leukemiezh dec'hanez gant un ardizh ouzh skinadoù ionaus.
- radioligand** ◇ **radio-induced leukemia** ◇ **skinlenant** *g.* Lenant skinoberiek (sl. *ligand*).
- radiologie** ◇ **radiology** ◇ **skinouriezh** *b.* Rann ar fizik o plediñ gant ar skinoù X, ar c'horfoù skinoberiek hag an dedalvezadurioù anezho. Er vezekniezh, an termen *s.* a vez amberzet ent klasel evit pleustr ar skinoù X, dedalvezadurioù deznaouiñ ha kurañ ar c'horfoù skinoberiek o vezañ tra ar *vezekniezh derc'hanel*. An anvad hollekoc'h a *skeudennezh mezegele* o vezañ erlec'hiet

hiviziken ouzh an hini a *skinouriezh deznaouiñ*, ar skinourion, dasparzhet bremañ e div arbennigiezh diouto o unan (skindez-naou ha skeudennerezh mezegel diouzh un tu, ha skingurañ diouzh an tu all) a ren ivez an imbourc'hioù skeudennerezh dre zasson gwarellec hag imbourc'hioù 'zo o tennañ d'ar stenerluniñ.

radiologie interventionnelle ◇ **interventional radiology** ◇ **skinouriezh wezhiadennel** Arver deznaouiñ ha kurañ ar skinouriezh trewan. Erdalañ a ra dreist holl ar gwazhiedatleviñ, an enfraouennañ talmerel, lies erlamad embreget dre gateteriñ, ensezadur siloù gwazhiennel kav, an ensinkladurioù diuzel engwazhiennel eus fibrinloezerioù pe eus danvezzennoù mitozastaler, gwezhiadennoù enkroc'henelec war ar forzhioù bestl ha troazhañ, hag ivez ar gronnloezañ.

radiologiste ou **radiologue** ◇ **radiologist** ◇ **skinour g.** Arbennigour e skinouriezh.

radioluminescence ◇ **radioluminescence** ◇ **skindreluc'hañ** Luc'hec'hodiñ devoudet gant skinadoù ionaus.

radiomanométrie ◇ **radiomanometry** ◇ **skinwaskventañ** Kalvezder imbourc'h ar gwazhied ha sanioù bevedel all diwarbouez ensinklañ Xdemerennoù dindan wask reolet. — *s. ar forzhioù bestl* : skinimbourc'h leuniadur ar gellenn, san ar gellenn hag ar forzh sanvestl-avu, hag ivez ar gwaskoù rekis evit lakaat al liñvenn dargemm da arakaat en kez elfennoù. Embreget e vez e-kerz ur wezhiadenn war ar forzhioù bestl, dre ezwanañ ar gellenn, ar sanioù kellenn ha bestl, pe goude ar wezhiadenn, dre ur wehenell lezet er sez. Ditouriñ a ra heforzhded ha tant ar forzhioù bestl hag ivez arc'hwel ar c'helc'hstrishaerioù o arouleviañ an ec'holadoù anezho. — *s. porzhel* : imbourc'h treoberatael ar reizhiad wazhiennel porzh, he glennadur, he dasforzhadoù gant ar gwazhiennnoù kav ha gwask ar gwad en o diabarzh.

radiomètre ◇ **radiometer** ◇ **skinventer g.** Ardivink amkanet da zinoiñ ha da vuzuliañ ar gremm skinel.

radiomicromètre ◇ **radiomicrometer** ◇ **skingorventer g.** Ardivink amkanet da vuzuliañ argemmadou bihan ar gremm skinel.

radiomimétique ◇ **radiomimetic** ◇ **1 skingeveler aa., skinvanek aa. 2 skingeveler g. -ioù, skinvaneg g. -eier** 1 A-zivout an danvezzennoù o tec'han gweredoù heñvel ouzh re ar skinoù ionaus. 2 Danvezzennoù skingeveler.

radiomucite ◇ **radiomucitis** ◇ **skinc'hlaourgenno g.** Tanienn ur glaourgen devoudet gant skinadoù ionaus, a orin skinguradel alies.

radiomutation ◇ **radiomutation** ◇ **skindargenañ, skindargenad g.** Dargenañ devoudet gant ar skinadoù ionaus.

radionécrose ◇ **radionecrosis** ◇ **skinvarvennañ, skinvarvenn b., skinvarvennad g.** Dispenn ar gwiadoù ardzhet ouzh doenadoù re uhel a skinadoù ionaus.

radionucléide ◇ **radionuclide** ◇ **skinnukleid g.** Nukleid skinoberiek.

radio-opaque ◇ **radiopaque** ◇ **skindemer aa.** Demer ouzh ar skinoù X pe ar skinadoù ionaus all.

radiopathologie ◇ **radiopathology** ◇ **skingleñvedouriezh b.** Studi ar skinanafoù devoudet gant ardzhadoù reñverek ouzh ar skinadoù ionaus.

radiopelvigraphie ◇ **radiopelvigraphy** ◇ **skinlestrluniñ** Skinluniñ dedalvezet da imbourc'h al lestr.

radiopelvimétrie ◇ **radiopelvimetry** ◇ **skinlestrventerezh g.** Dedalvezadur ar skinluniñ da vuzulierezh treuzkizoù al lestr.

radiopharmaceutique ◇ **radiopharmaceutical** ◇ **1 skinliael aa. 2 skinlia g.** 1 A-zivout ul lia erbaret da finvezioù kennevidel (tieller), deznaouadel pe yac'hadel, ar wezhuzenn anezhañ o vezañ ur volekulenn tiellet gant ur skinizotop. 2 Lia a c'hell bezañ arbaret da vezañ arveret war-eeun, met ar peurliesañ, oc'h engwerc'hañ digresk ar skinoberiegezh, ez eus daou lia digevret eus ar volekulenn da diellañ hag eus an tieller skinoberiek, darbaret en arbred enta.

radiophotographie ◇ **radiophotography** ◇ **skinluc'hskeudenn b.** Luc'hskeudenn al lun skinsell.

radioprotecteur ◇ **radioprotector** ◇ **skinwareduzenn b.** Danvezenn gimiek en araez da zistav gweredoù argevezus ur skinata, gant ma ve diounezet d'ur bev kent an ardzh.

radiorésistance ◇ **radioresistance** ◇ **skinharzusted b.** Harzusted ar c'helligoù, ar gwiadoù pe an organoù ouzh gweredoù argevezus ar skinadoù. Emañ ar *s. e dalc'h natur* ar bevedeg skinataet, e *dalc'h natur* ha kreñvder ar skinadoù, hag ivez e *dalc'h natur* ar gwered desellet.

radiorésistance acquise ◇ **acquired radioresistance** ◇ **skinharzusted arzeuat** Digresk kizidigezh ur gwiad ouzh ar skinoù X da heul ardzhadoù arreat ha hirbad gant doenadoù war gresk.

radiorésistant ◇ **radioresistant** ◇ **skinharzus aa.** Harzus ouzh ar skinoù X.

radiosarcome ◇ **X-ray sarcoma** ◇ **skinsarkom g.** Sarkom devoudet gant ar skinoù X pe gant danvezzennoù skinoberiek.

radioscopie ◇ **fluoroscopy** ◇ **skinselliñ** Studi ar skeudenn gwereet war ur skramm kendreluc'h gant ur c'horf loet etre ar skramm-se hag ur vammenn skinoù X.

radioscopie télévisée ◇ **teleradiology** ◇ **skinselliñ pellwelaet** Kalvezder skinselliñ ma 'z eo erlec'hiet ouzh ar skramm skinselliñ ur ristenn pellwel dre hantererezh ur skedamplae. Ar savad sked gounezet a gevaraez an imbourc'h en ur sal goulaouet gant ul leiadur anat eus an doead skinoù X degemeret gant ar gouzviad.

radiosensibilité ◇ **radiosensitivity** ◇ **skingizidigezh b.** Kizidigezh ar c'helligoù, ar gwiadoù pe an organoù ouzh gweredoù argevezus ar skinadoù. Emañ ar *s. e dalc'h natur* ar bevedeg skinataet, e *dalc'h natur* ha kreñvder ar skinadoù, hag ivez e *dalc'h natur* ar gwered desellet.

radiosensible ◇ **radiosensitive** ◇ **skingizidik** aa. A c'hell bezañ darllet gant ar skinadoù ionaus.

radiostimulation ◇ **radiostimulation** ◇ **skinfraouaat** Arloadur ar skinoù X, diounezet a zoenadoù bihan, en amkan da gaout anadennoù fraouaat arc'hwelel, hep bezañ heuliet gant ur gwered gin, e par an organ skinataet.

radiothérapeute ◇ **radiotherapist** ◇ **skingurour** g. Arbennigour war ar skingurañ.

radiothérapie ◇ **radiotherapy** ◇ **skingurañ** Arver yac'hadel ar skinadoù ionaus. Alies e vez graet gant an termen *s.* evit deanviñ ent spesadek ar c'hurañ dre ar skinoù X (sl. *röntgentherapie*).

radiothérapie cinétique ◇ **kinetic radiotherapy** ◇ **skingurañ diaññvel** Kalvezder skingurañ oc'h arverañ un hordenn skinoù war loc'h a-gendalc'h. An dilec'hiadur a vez erwerc'het pe dre c'hweladur ar vammenn skinoù en dro d'ar c'hlañavour fest e loadur, pe dre c'hweladur ar c'hlañavour en un hordenn fest.

radiothérapie de contact ◇ **Chaoul's therapy** ◇ **skingurañ diastok** Anvet ivez *hentenn Chaoul*, ar *s. d.* zo ur skingurañ berrhed, eleze ar pellder etre ar vammenn hag ar c'hroc'hen ne zistremen ket 10 cm. Arveret e vez ar c'halvezder-se er groc'henouriezh pergen hag ivez e mezegadur ar yoc'hennoù kantet hag aes da ziraez.

radiothérapie intracavitaire ◇ **intracavitary radiotherapy** ◇ **skingurañ enkavennel, enskingurañ** (sl. *endoradiothérapie, endoröntgentherapie*).

radiothérapie pénétrante ◇ **penetrating radiotherapy** ◇ **skingurañ trebarzhus** Erwerc'het dindan 200 – 300 kV, ar *s. t.* a gevaraez dilaoskiñ d'ar yoc'henn doenadoù muiet a-zon, en ur erbediñ an talennoù bas.

radiothérapie superficielle ◇ **surface radiotherapy** ◇ **skingurañ gorre** Er *s. g.* ez eo luget ar skinadoù gant an 2 – 3 cm kroc'hen, koulz lavarout hag ar gwiskadoù don n'int ket tizhet. An tredanvarr arveret zo bihanoc'h eget 100 kV.

radiotomie ◇ **tomography** ◇ **haenluniñ** Hentenn imbours'h a bourchas ur skeudenn a-skej, ur skejad gwirion diuzet an donder anezhañ.

radique ◇ **radiation-induced** ◇ **1 skinel** aa. **2 skinadien** aa. 1 A-zivout ar skinoù. 2 Devoudet gant ar skinadoù ionaus, boaziet evit ar c'hurañ.

radium ◇ **radium** ◇ **radiom** g. Skinelfenn, a niverenn atom 88 hag a dolz atom 226, arouez Ra, oc'h ec'hodiñ skinadoù α , β ha γ . Ur metal prialkaliek gwenn eo, o tennañ d'ar bariom, arveret er skingurañ e rezh nadozioù moan sanket er gwiadoù kankrek.

radiumdermite ◇ **radium-dermatitis** ◇ **radiomgroc'henfo** g. Anaf kroc'hen devoudet gant an ardizh ouzh ar radiom.

radiumthérapie ◇ **radium therapy** ◇ **radiomgurañ** Kurigurañ oc'h arverañ ar radiom (sl. *curiethérapie*).

radius ◇ **radius** ◇ **gwerzhid** b. Askorn o furmañ gant an helmo atel an arvec'h.

radius curvus ◇ **radius curvus** ◇ **disneuziad** g. **Madelung** (sl. *carpocypose*).

radon ◇ **radon** ◇ **radon** g. Skinelfenn aezhel diwar digevanidigezh ar radiom, a niverenn atom 86 hag a dolz atom 222. Arouez : Rn. Emañ en aergelc'h a gementadoù bihan.

Raeder : **syndrome de ~** ◇ **paratrigeminal syndrome** ◇ **azoniad g. Raeder** Laur kloppenn-dremm kevredet gant un azoniad Claude Bernard-Horner, dre dizhad pazennek barr a-lagad an nervenn drigevell hag an nervenn simpatek trogarotidel.

rage ◇ **rabies** ◇ **konnar** b. Pore tredizhus grevus, piaouel da loened 'zo (ki, kazh, louarn, bleiz, askell-kroc'hen), treuzkaset d'an den dre vrazhad al loened poreet, diwar ur viruz eus ar genad *Lyssavirus*, kerentiad ar *Rabdovirideged*. War-lerc'h ur gounervezh o vont eus 1 da 6 mizvezh e tinod ar c'hleñved, ur pilhonempennfo strewek a c'haller diverzhout ennañ tri frantad mui pe vui kenheuilh : ul lankad ragazonel, gant kemmadennoù neuzid, gouvid, aonigezh, laurioù sezet e kleizenn ar brazhad ha kammeraezioù; ul lankad broudedigezh, gant andagoù garv eus kigennoù ar c'hargadenn, dourgaz, andagoù kridek an izili hag ar c'hef, ha strafuilhoù bred (barradoù maniakel, trezerc'hioù); ul lankad gouvid gant seizi an eizhaennoù hag an nervernoù aglopenn. Ar marv diwar ar gonnar diskleriet zo andistrec'h, o tarvezout dre harzanal. Deskrivet ez eus bet anafoù spesadel sezet en nergreizennoù, gant dinodadur ebarzhennoù kitoplasmel (korfoù Negri). Ned eo gweredus ar mezegadur dizoloet gant Pasteur nemet e-kerz ar gounervezh, ur vaksinadur anezhañ kevredet gant ar gwadvezikurañ.

rage de laboratoire ◇ **laboratory contamination rabies** ◇ **konnar arnodva** Furm nemedennek a gonnar arzodet d'an tredizhañ e-doug prientidigezh ar vaksin.

rage furieuse ◇ **furious rabies** ◇ **konnar arfleuet** Furm a gonnar, muiet kenan enni al lankad broudedigezh.

rage muette ou **rage paralytique** ◇ **paralytic rabies** or **dumb rabies** ◇ **konnar beluzel** pe **konnar vut** Furm a gonnar, ar seizi o vezañ enni an azon kentrat ha trec'h.

rage sauvage ou **rage sylvatique** ◇ **sylvatic rabies** ◇ **konnar ouezedel** pe **konnar ar c'hoadeier** Konnar ar gouezed.

rage urbaine ou **rage des rues** ◇ **street virus rabies** ◇ **konnar doñvedel** pe **konnar ar straedoù** Konnar an doñved.

ragocyte ◇ **ragocyte**, **RA cell** ◇ **ragokit** s. Leukokit greunek naouus dre c'hreunennadoù kitoplasm, enno kediadurioù immunoglobulin G, immunoglobulin M ha fibrin. O c'havout a reer en iruzenn eus al liesarzo rumatoidel.

Raimiste : **signe de ~** ◇ **Raimiste's sign** ◇ **arouez** b. **Raimiste** 1 evit an ezel krec'h : pa saver arvec'h ha dom ur gouziviad gousezet, an dom a gouezh diouzhtu pa n'en skorer ket mui 2 evit an ezel traoñ : ar gouziviad o vezañ gourvezet a-gein e telanker ur fiñv pellaat pe nesaat eus ar c'har seizet, pa ebeber ouzh kefleuniadur an kez fiñv arc'het diouzh an tu bonan.

râle ◇ **rale** ◇ **ronk** g. Nep trouz anreol merzhet da-geñver ar selaouennañ a-skevent, devoudet dre tremen an aer a-dreuz ar borc'hadennoù o steviañ an aerforzhioù. Kemm a lakaer etre *r. straklus* (Gl. *râle crépissant*), *r. bouilhek*, *r. mouest* (Gl. *râle bulleux*, *râle humide*), *r. goustraklus* (Gl. *râle sous-crépissant*), *r. glaourek* (Gl. *râle muqueux*), *r. sec'h* (Gl. *râle sec*) (sl. an termenoù-se).

rameau collatéral ◇ **collateral branch** ◇ **rannvarr** g. **kengostezel** Barr o tont er-maez eus kef ur wazhiedenn pe un nervenn.

rameaux communicants ◇ **communicating branches** ◇ **barroù** l. **treuzkiz** Teskad an nervwiannoù o keneren an nervennoù a-livenn da gangrennoù kef simpatek ar mellkein.

ramicotomie ou **ramisection** ◇ **ramisection** ◇ **barrenbenañ** Enbenañ barroù treuzkiz ar reizhiad simpatek, gwenn (rak-gangrennel) pe louet (goudekangrennel).

ramollissement ◇ **softening**, **malacia** ◇ **boukaat**, **boukadur** g. Argerzh kleñvedel dic'henezhadel naouus dre leiadur kantalc'h ur gwiad.

ramollissement cérébral ou **cérébromalacie** ◇ **cerebral softening** or **encephalomalacia** or **cerebromalacia** ◇ **boukadur empenn** pe **empennvlodad** g. Annon marvennañ ar gwiad empenn diwar un heskwad dre dromboz pe diwar un enfroù talmerel, oc'h erzerc'haat ent klinikel dre un orc'had. Ent gwiadoniel ez argemm liv ar gwiad gwazhet hervez hended an anaf hag anv zo a vlodadur melen, gwenn pe louet.

ramollissement graisseux des os ◇ **bone fatty degeneration** ◇ **boukadur behinek an eskern** pe **dic'henezhadur behinek an eskern** Dic'henezhadur an eskern naouus dre un usvent eus ar c'havennoù mel ha dre vezañs ul liñvenn eoulek e mel ar steuñvenn spouek. Arsellet e vez e torzhellegezh an eskern.

ramollissement hémorragique ◇ **hemorrhagic softening** ◇ **boukadur gwadliñvel** Boukadur ur gwiad diwar ur gwadliñv.

ramollissement médullaire ◇ **myelomalacia** ◇ **boukadur ar mel a-livenn**, **livennvlodad** g., **melvlodad** g. Boukadur ar mel a-livenn, diwar dromboz un dalmerenn a-livenn.

ramollissement mucoïde ◇ **mucoïd softening** ◇ **boukadur mukinvanek** Rizh boukadur empenn naouus dre un dic'henezhadur mukinvanek eus ar nervwiad tizhet.

ramollissement vertébro-basilaire ◇ **basilar cerebromalacia** ◇ **boukadur melkein-diazpenn** Marvenn ar gwiad empenn en triad eroueriet gant ar reizhiad talmerel mellkein-diazpenn : kef an empenn, an ilpenn, ar mel gouzoug hag un darn eus an tolbezennoù ividig ha kilpenn. An azoniad nervel zo e dalc'h eus an tachad tizhet hag eus astenn an anafoù.

Randall : **syndrome de** ~ ◇ **Randall's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Randall** Bloueigad diwar zaspugn digorvelloù skañv a immunoglobulinoù arsellet e-doug ar mielom.

randomisation ◇ **randomization** ◇ **diforzhekaat** Hentenn oc'h arverañ an dargouezh dedalvezet d'an arnoderzh yac'hadel.

ranitidine ◇ **ranitidine** ◇ **ranitidin** g. Danvezenn c'hourzhaler buzerioù H₂ an histamin, ha heuder borc'hadur trenkenn ar stomok. Letañvel ouzh ar c'himetidin, arveret e vez e mezegadur an angreizh kreuz-daouzegenn.

Ranke : **cycle de** ~ ◇ **Ranke's stages** ◇ **lankadoù** l. **Ranke** Arlakadenn o vrastresañ mod dedreñ an dorzhellegezh e tri lankad : 1) kentpoad; 2) strewidigezh; 3) torzhellegezh ar skevent. Arzaet kenan e vez bremañ an arlakadenn-se.

Rankin : **clamp de** ~ ◇ **Rankin's forceps** ◇ **klamp** g. **Rankin** Klamp triskourrek arveret en dazbidañ ec'hampelenn eus ar c'holon.

Rankin : **opération de** ~ ◇ **Rankin's operation** ◇ **oberatadenn** b. **Rankin** Hentenn kolonezvenañ hollel e tri lankad : 1) klunegennezforzhañ diabenn 2) kolonezvenañ eus penn ar glunegenn betek traoñ at c'holon sigma; 3) ambidañ ar youlc'h dre an hent a-gof hag an hent a-c'harbedenn.

Ransohoff : **opération de** ~ ◇ **Ransohoff's operation** ◇ **oberatadenn** b. **Ransohoff** Prederiadur surjial al linoglad dre lies skejad kroazvanek eus ar c'hrezoù.

Ranvier : **étranglement de** ~ ◇ **Ranvier's node** ◇ **strishaenn** b. **Ranvier** Strishadur kelc'hiek a entremezioù reoliek (1 mm) arsellet war an nervwiannoù mielinek.

Ranvier : **segment de** ~ ◇ **Ranvier's segment** ◇ **hoskad** g. **Ranvier** Parzh eus ar nervwienn mielinek gavaelet etre div strishaenn Ranvier.

râpe ◇ **xyster** ◇ **rasklerez** b. Seurt livn gant dent bras arveret e surjianerezh an eskern evit gouzelviñ gorre an eskern ha plegañ o gorreennoù.

râpe : **bruit de** ~ ◇ **rasping murmur** ◇ **trouz** g. **rasklerez** Sourr garv, heñvel ouzh hini ur rasklerez, merzhet en anafoù trapigel 'zo (isvoll trapig).

raphanie ◇ **raphnia** ◇ **raonellegezh** b. Pistriadur henek arzodet ouzh greun ar raonell (*Raphanus raphanistrum*), heñvel ouzh an druilhegezh ha naouus dre glizi en izili.

raphé ◇ **raphe** ◇ **dldidell** b. Linenn valirek — anvet ivez *gwriad* — dec'hanet dre groazigelladur gwiennoù o tont alies eus daou barzh kemparzhdek dehou ha kleiz un organ, ha dre se loet war al linenn greiz. Da skouer : dldidell ar gousac'h (Gl. *raphé du scrotum*).

rapide

• *propriétés protectrices, rapides mais temporaires* perzhioù gwareziñ, prim met berbad • *une immunité rapide et temporaire* un

hangae kentrat hag amzeriat • *l'augmentation rapide de la pression* muiadur herrek ar gwask • *évoluant rapidement vers la mort* a gase herrek d'ar marv • *rapidement mobilisable* degerzadus afo • *formes rapidement mortelles* furmoù a zedro marvus herrek.

rappel : bruit de ~ ◇ **bruit de rappel** ◇ **adstlak** Azdoubladur stlaket eil trouz ar galon, klevadus e par kern ar galon da-geñver un isvoll mintrek, devoudet gant stlak digeriñ an trapig sklerozek.

rappel : injection de ~ ◇ **booster dose** ◇ **ensinkladenn** b. **assav, ensinkladenn azgrenaat** Ensinkladenn (pe sankadenn) vaksin nevez war-benn adsavelañ pe aznerzhañ an hangae

rapp-

• *se rappeler l'information* daskoriñ (daskounañ) ar stlenn • *perturbation du rappel des informations anciennes* andaskoun an eñvoriou a-gozh • *érythème rappelant le lupus érythémateux* eritem a rafe gousellout ul lupuz eritematus • *en rapport (causal) avec* e dianlen • *rapprochement des bords d'une ouverture* denesaat ribloù un digor • *rapprocher les faces opposées de* lakaat stok-ha-stok talioù kevenep • *percevoir des objets très rapprochés* merzhout ergorennoù nes tre.

raptus ◇ **raptus** ◇ **dergerc'h** g. Strapad feuls a gefroù taer gant ur bredklañvour, o tisoc'h war an emlazhañ, an emvuturniañ pe ar muntrañ.

rash ◇ **rash** ◇ **yazad** g. Dispuilh kroc'hen padennek diseurt e arbennoù (pore, erwezh allergek, h.a.).

Rashkind-Miller : technique de ~ ◇ **Rash-kind-Miller procedure** ◇ **kalvezder** g. **Rashkind-Miller** Kalvezder kalonour-iezhañ wezhiadennel o krouiñ ur c'hehentaad etrekentezoù goustegus e kalonanaezioù ganedigelezh dulaseiat 'zo.

Rasmussen : syndrome de ~ ◇ **Rasmussen's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Rasmussen** Empennfo henek arsellet en ur gouzrec'h yaouank ha naouus *ent clinique* dre varradoù droukfell liaharzus ha dinodadur pazennadek eus divigadoù santout-loc'hañ ; *ent neuro-idiadurel* dre lies anaf sezet en un hanterenn empenn. Dianav eo arbenn an naoued, e dalc'h marteze ur pore diwar kitomegalovirus.

Rasmussen : anévrisme de ~ ◇ **Rasmussen's aneurysm** ◇ **darvoll** g. **Rasmussen** Frankadur un dalmerennig skevent o trehentiñ e speur ur vougev dorzhellek. Ar fregadur anezhi a zevoud ur skrouediañ gwad, marvus alies.

RAST ◇ **RAST (Radio-Allergo-Sorbent Test)** ◇ **RAST** g. Kalvezder arveret e bevoniezh vezegel — en hangaegleñved-ouriezh — evit dezventañ an immunoglobulinoù E spesadek eus un allergen roet.

Rastelli (et Mac Goon) : opération de ~ ◇ **Rastelli's operation** ◇ **oberatadenn** b. **Rastelli** Dasforzhad etre ar c'hofig dehou ha kef ar skevent e degouezhioù 'zo a bevaradezh Falloù.

rate ◇ **spleen** ◇ **felc'h** b. Organ limfoidel gwadparadel ha gwadloezadel, blot e gantalc'h, vigelc'hiek hag arblat e stumm, 200 g e bouez keitat, ruzvouk e liv, loet er c'hougestadenn gleiz, a-dreñv ar stomok, dindan ar gelc'hspeurenn, a-us ha dirak al lounezh kleiz. C'hoarvezout a ra eus ur pourc'had stirwiennek ma loc'h dioutañ ur rouedad wianoù kourzadek, a zo an esaouennoù anezho leuniet gant bouedenn felc'hel, amparet gant gwad, limfkelligoù, gwadkelligoù ha kelligoù gouskor. Emañ ar bolc'hennoù limfoidel war speurioù an talmerennigoù. Ereet eo ar felc'h ouzh ar gelc'hspeurenn dre ar stagell vegin-felc'h, harpañ a ra ouzh ar stagell stomok-kolon hag enkloz eo er stagell stomok-felc'h. Ar gwazhied hag an nervennoù a ya e-barzh hag a zeu er-maez dre ur begel diazerc'h o frankaat war ar c'hostez dehou. Ar felc'h a zistruj kelligoù ruz ar gwad ha dilaoskiñ anezho an hemoglobin, treuzfurmet neuze e bilirubin gant an avu. E-se e wered evel kadaver elfennoù luniek ar gwad, e tasperzh e furmadur al limfokit hag ar monokit hag e paradur antikorfoù.

rate amyloïde ou **rate lardacée** ◇ **bacon spleen** ou **lardaceous spleen** ◇ **felc'h amiloidel** pe **felc'h lardvanek** Felc'h gant un ensiladur amiloidel strewek.

rate hypertrophiée moyenne ◇ **porphyry spleen** ◇ **felc'h usventek keitat** Niver o tewaterzhañ derez keitat usvent ar felc'h en ur strollenn baludeion o tiskouez ur felc'husvent teutadus.

rate porphyroïde ◇ **porphyry spleen** ◇ **felc'h porfiroïdel** Felc'h naouus dre vezañ un niver bras a nozelennoù glaswenn war ur goueled ruz-mouk. Dezverkus eo da gleñved Hodgkin.

rate sagou ◇ **sagou spleen** ◇ **felc'h sagou** Felc'h ensilet enni un danvezenn amiloidel o erzerc'hañ e rezh greun bihan arlouet, luc'hus, a vent gant ur c'hros, heñvel ouzh greun sagou poazh.

rates accessoires ◇ **accessory spleens** ◇ **adfelc'hoù** Tolzennoùigoù a wiad felc'hel, gronnet e pep a bourc'had, a gaver alies e-kefin begel ar felc'h.

Rathke : poche de ~ ◇ **Rathke's pouch** ◇ **godell** b. **Rathke** Bogod kavenn rizhellel ar genoù a zisoc'h gant tolbezenn araok ar c'hougorfenn.

Rathke : tumeur de la poche de ~ ◇ **Rathke's cyst** ◇ **yoc'henn** b. **godell Rathke** Furmadurioù kistek diorreet diwar-goust aspadennoù godell Rathke a c'hell amwaskañ al luniadoù ebarzh- hag us-dibr.

raticide ◇ **raticide** ◇ **razhlazher** g. Aozad en arez da zistrujañ ar c'hriagnered, ar razhed pergen.

ration alimentaire ◇ **food ration** ◇ **feurlod** g. **bouedel** Kementad boued a zle bezañ euvret bemdez war-benn kevaraezañ trezalc'h ha kresk ar bevedeg.

rationalisation ◇ **rationalization** ◇ **heboellaat** Argerzh bred a glask ur gouzrec'h kantreizhañ drezañ, war-bouez displegadurioù azas ouzh dezverkoù divezel pe poellel, mennozioù, trivliadoù pe realoù andegemeradus evitañ.

raucité ◇ **hoarseness, raucity** ◇ **raouadur** g. Doare ur vouezh, ur son raouliet.

Rauwolfia ◇ **Rauwolfia** ◇ **Rauwolfia** Genad gwez ha brousgwez trovanel eus kerentiad an *Apokinakeged*, ennañ ouzhpenn 100 spesad, a bourchas lies alkaloid, deurus lod anezho evit ar vezekniezh, evel ar rezerpin. Menegomp *Rauwolfia Serpentina*, plantenn arveret abaoe pell en India evit he ferzhioù hezus, ha hiziv evel iswaskeiad ha hezer, daoust m'he deus kollet he fouezusted evit un darn.

Ravasini : **test de** ~◇ **Ravasini's test** ◇ **prouad g. Ravasini** Andalañ talvoud arc'hwelel al lounezhi. Ul lounezhi a zo demeraiet ar c'havennoù lestrakirel anezhi etre tri ha pemp munud war-lerc'h ensinkladur engwazhiennel an aozad dargemm zo ul lounezhi bastus he arc'hwelel.

Raymond : **syndrome de** ~◇◇ **azoniad g. Raymond** Teskad ar strafuilhoù bred arsellet en anafoù ar c'horf karnek. Naous eo dre un diouer kevanlen er mennozioù, dre zoareoù ha realoù iskis, strafuilhoù er c'hounerezh o tizhout da gentañ an devoudoù nevez, hag erziwezh dre gemmoù don eus an neuzid : brouezusted, berrboelleded, dibrederezh.

Raymond Cestan : **syndrome de** ~◇ **Raymond-Cestan syndrome** ◇ **azoniad g. Raymond Cestan** Azoniad dustat pontel uhelañ o tevoudañ seizi a-gendu al lagad hag un digenurzh ilpennel a-gendu, kammeraezioù hag ul ledc'houseizi skañv a-eiltu.

Raynaud : **maladie de** ~◇ **Raynaud's disease** ◇ **kleñved g. Raynaud** Anaez naous dre strafuilhoù gwazhiedloc'hadel an eizhaennoù o tedreñ en un doare grezvarrek, gant dinodadur un heskwad, ha goude un dulaz hag ur moug lec'hiek gant ur santadur bizied marv. Dianav e orin ha dav eo lakaat kemm etrezañ hag azoniad Raynaud, eilvedel d'un arbenn savelet.

Raynaud : **syndrome de** ~◇ **Raynaud's phenomenon** ◇ **azoniad Raynaud** Barradoù gwelved heuliet gant dulaz ha ruzder ar bizied. Eilvedel eo a. R. da lies anaez (gwadkrioglobulinegezhioù, tromboangeit anforzhus, kollagenozioù, azoniad gouzoug-brec'h, h.a.) ha d'ar prederiadur dre ar betadole'herioù. Kenkempazhek ar peurliesañ e vez ambrouget gant strafuilhoù isteñvus hag a-wechoù gant breinged.

rayonnement ◇ **radiation, ray** ◇ **skinañ** Ec'hodiñ adalek ur vammenn ha treledañ en ur metoù gremm ha fñivad oc'h angorzhañ gwagennoù tredanwarel pe rannigoù. Graet e vez gant an deveradoù *skin, skinad, skinadenn, skinadur, skinerezh*, hervez an durc'hadur ster ambredet. Gant *skin* ez eus anv eus an anadenn he unan, da skouer *genel skinoù X dre zarstekiiñ elektron uhelc'hremm ouzh ur vukenn vetal* ha gant *skinad* e vo kel eus ar c'hementad gremm, da skouer *andalañ douester an eskern dre vuzuliañ lugadur ur skinad X*. Gant *skinadur* e reer dave da zisoc'h ur skinañ dibarek, da skouer *skinadur ionaus ret evit lazañ 50 % eus al loened dindan arnod.* (sl. **radiation**)

— *rayonnement alpha, rayons α* ◇ *alpha radiation* ◇ *skinad α , skinoù α* : skinoù (skinad, skinadur) ionaus (derc'hanoù heliom) ec'hodet gant korfoù skinoberiek 'zo

— *rayonnement bêta, rayons β* ◇ *beta radiation* ◇ *skinad β , skinoù β* : skinoù (skinad, skinadur) ionaus (elektron) ec'hodet gant korfoù skinoberiek 'zo

— *rayonnement gamma, rayons γ* ◇ *gamma radiation* ◇ *skinad γ , skinoù γ* : skinoù (skinad, skinadur) tredanwarel amparet gant foton uhelc'hremm dec'hanet gant diargridadur un derc'han o tisoc'h eus un digevanad

— *rayonnement corpusculaire* ◇ *corpuscular radiation* ◇ *skinañ rannigel, skinad rannigel* : skinañ (skinad, skinadur) rannigoù danatomel, evel ar proton, an neutron, an elektron

— *rayonnement X, rayons X* ◇ *X-rays* ◇ *skinoù X, skinad X* : skinañ tredanwarel a drohed berr kenan (etre an dreistmouk hag ar skinoù γ), dizoloet e 1895 gant Röntgen, dezho ar perzh treuziñ danvezioù demer 'zo ha kizañ plakkennoù luc'hgizidik. Hevelep perzh zo diazez ar c'halvezderioù skinkluniñ. Kemm a lakaer etre ar skinoù X *kalet*, berr an trohed anezho, uhelc'hremm, trebarzhus kenan hag ar skinoù X *gwak*, hir a-walc'h an trohed anezho, izelc'hremm, nebeut trebarzhus

— *rayonnement infrarouge, rayons infrarouges* ◇ *infrared ray* ◇ *skinoù danruz, skinad danruz* : skinoù tredanwarel gavaelet etre ar rannbarzh gweladus eus ar skalfad (war-dro 770 nm, ar penn ruz) ha rannbarzh ar c'horrwag (war-dro 1 mm). Arveret e vez ar skinad danruz er vezekniezh evit e weredoù gwrezel. Kevaraezañ a ra da ren elfennerezh doaread ha kementadel lies danvezenn (skalfadlunerezh danruz)

— *rayonnement ionisant, rayons ionisants* ◇ *ionizing radiation* ◇ *skinoù ionaus, skinad ionaus* : nep skinañ tredanwarel pe rannigel dezhañ gremm a-walc'h da zec'han, rageeun pe ameeun, ion o treuziñ an danvez, evel da skouer ar skinoù X, ar skinoù α , β , γ , al lanvadoù proton, elektron

— *rayonnement primaire* ◇ *primary ray* ◇ *skinad kentael* : skinad ec'hodet rageeun eus ur vammenn skinoberiek pe eus ar gorzenn ec'hoder skinoù X

— *rayonnement secondaire* ◇ *secondary ray* ◇ *skinad eilvedel* : skinad ec'hodet gant nep danvezenn skinataet gant ur skinad tredanwarel pe rannigel

— *rayonnement ultraviolet* ◇ *ultraviolet ray* ◇ *skinad dreistmouk* : skinad tredanwarel gavaelet an trohed anezhañ etre hini al luc'h gweladus (400 nm, penn mouk ar skalfad) ha hini ar skinoù X (20 nm). Ar s. d. A, hir o zrohed, a gaver paot e gouloù an heol. Ar s. d. B, keitat o zrohed, a vez arveret er vezekniezh (luc'hgurañ). Ar s. d. C, berr o zrohed, zo dezho gweredoù kimiek ha bakterioezadel

— *rayons actiniques* ◇ *actinic rays* ◇ *skinoù aktinek* : luc'hskinoù a zo dezho ur gwered kimiek

— *rayons cathodiques* ◇ *cathode rays* ◇ *skinoù katodek* : skinoù ec'hodet gant katod ur gorzenn Crookes, leivec'hiet (elektron) hag o treledañ areeun. Pa skoont ouzh gourzhkatod ar gorzenn e tec'hanont skinoù X.

réactant ◇ **kengediant g.** Nep danvezenn o kengediañ, o tasperzhiañ en un dazgwered kimiek.

réactif ◇ **reagent** ◇ **1 gweredus aa., dazgweredus aa., kediüs aa., kediidik aa. 2 kediuzeññ b.** 1 En araez da werediñ, da luskañ un dazgwered, da gediañ ouzh ur c'hediad. 2 Aozad dazgweredus, kediüs, kediidik.

réaction ◇ **reaction** ◇ **1 erwezhiñ 2 dazgwerediñ 3 ersav 4 dastaol** 1 *Erwezhiñ* eo an termen hollek arveret evit devoudezh anadennoù bevedel spesadel, e-barzh pe er-maez eus ar bevedeg. 2 *Dazgwerediñ* a arverer e kimiezh pa wered kediadoù etrezo ha disoc'h gant furmadur kediadoù all. Arveret e vez ivez e fizik, en derc'hanouriezh da skouer. 3 *Ersav* zo an termen arveret evit ar realezh. 4 *Dastaol* a vez arveret e troiennoù dibarek.

réaction allergique ◇ **allergic reaction** ◇ **erwez h. allergik** Erwez hollek pe lec'hiek, kroc'henek pergen, a-berzh ar c'horf pa vez e diastok gant un danvezenn ez eo dreistkizidik outi.

réaction anamnétique ◇ **anamnetic reaction** ◇ **erwez h. hanezadel** Anadenn o tarvezout gant ur gouzrec'h hangaez a-rakwez gant un antigen savelet, pa zevoud un diounezad nevez eus an kez antigen ur muiadur eus ar feur antikorfoù keñverek, pe a lak an antikorff steuziet da zinodiñ en-dro. C'hoarvezout a ra an erwez-h-se da-geñver ensinkladennoù azgrenaat ar vaksinadurioù. E dalc'h ur vemor hangaez (sl. *mémoire immunologique*).

réaction anaphylactique ◇ **anaphylactic reaction** ◇ **erwez h. darwalladel, darwallad g.** (sl. *anaphylaxie*).

réaction ansérine ◇ **cutis anserina** ◇ **houpigañ, erwez h. an houpigañ** (sl. *chair de poule*).

réaction antigène-anticorps ◇ **antigen-antibody reaction** ◇ **dazgwered g. antigen-antikorff** Dazgwered a c'hoarvez pa ged un antigen gant un antikorff spesadel.

réaction biologique ◇ **biological reaction** ◇ **erwez h. bevoniel** Nep hentenn bevgimiek, gwadvezouriel, hangaeoniel, h.a., dewerc'het *in vitro* pe *in vivo* e sell d'an deznaou.

réaction consensuelle à la lumière ◇ **consensual reaction, consensual light reflex** ◇ **damoug g. luc'hloc'hadel keflank** Mabisvoll en ul lagad, hag eñ dalc'h et en deñvalijenn, pa daoler gouloù war egile. Heñvelsterioù : *damoug luc'hloc'hadel a-eiltu*.

réaction de dégénérescence ◇ **reaction of degeneration** ◇ **erwez h. dic'henezhadur, erwez gorrekaat** (sl. *dégénérescence : réaction de ~*).

réaction myasthénique ◇ **myasthenic reaction** ◇ **erwez h. miastenek** Isvroudadusted fardek ar c'higennoù.

réaction myotonique ◇ **myotonic reaction** ◇ **erwez h. miotonek** (sl. *myotonique : réaction ~*).

réaction thérapeutique négative ◇ **negative therapeutic reaction** ◇ **erwezhiad g. nac'hek ouzh ar gur** Anadenn a gaver da-geñver kurioù bredelfennañ 'zo evel rizh harzder ouzh ar pare diaes kenan da zistrec'hiñ : bep tro ma c'hortozer ur wellaenn dre berzh arakadur an elfennadenn, e c'hoarvez ur washaenn, evel pa vije gwell gant tud 'zo gouzañv eget pareañ. Freud a zeveize an anadenn-mañ evel gwered ur santad kablusted diemouez enlenat da luniadoù mazoc'hek.

E gwir, Freud, a-hed ar bloavezhioù, a ginnigas lerc'h-ouzh-lerc'h ur steudad displegadurioù evit an erwezhiad nac'hek : gludegezh al libido, andiraezadusted narkisek, gounid diwar ar c'hleñved, santad kablusted, mazoc'hegezh, harzder digant an dreistme hag, en dibenn, luzad a varv.

réactionnel ◇ **reactional** ◇ **erwezhiat aa.** A-zave d'an erwez, da skouer *anadenn erwezhiat ouzh un hegadenn*.

réactivation ◇ **reactivation** ◇ **1 azblivaat, azblivad g. 2 azraogañ 3 azniñvañ** 1 Gweredegezh ur garvev, ur viruz da skouer, ur pore, o kregiñ en-dro. 2 Azonoù ur c'hleñved a hañvale bezañ arsavet oc'h anadiñ en-dro, un annon torzhellek da skouer. 3 Adkrog barr gwerediñ un organ, un danvezenn, ur gwadvez (ouzhpennañ ur glokaenn nevez dre atodiñ gwadvez fresk d'unan aet ezniñv).

réactivité ◇ **reactivity** ◇ **erwezhiusted b.** Barr erwezhiañ ouzh kentrigoù diavaez.

réactogène ◇ **allergen** ◇ **1 allergen aa., erwesheiat aa. 2 allergen g. -où, erwesheiad g. -où** 1 En araez da zec'han un erwez allergiek. 2 Danvezenn allergen, erwesheiat.

réact-, réag-

- *ensemble des réactions inconscientes* teskad an erwezhiadoù diemouez • *un organisme ayant perdu la propriété de réagir à un allergène* ur bevedeg kollet gantañ ar perzh da erwezhiañ ouzh un allergen • *une réaction chimique est la cause de la réaction de l'organisme à l'allergène* un dazgwered kimiek zo e devoud erwezhiañ ar bevedeg ouzh un allergen • *réaction d'équilibration* dastaol kempouezañ • *réactivité allergique à des stimuli divers* an erwezhiusted allergiek ouzh kentrigoù diseurt • *réaction immunitaire (= combinaison chimique antigène-anticorps)* dazgwered hangaez (= kediadur kimiek antigen-antikorff).

réadaptation ◇ **rehabilitation** ◇ **azgouestaat** Teskad an diarbennoù a denn, en tu all d'an addioren arc'hwelel, da adsavelañ ar barregezhioù korfel, bredel hag arc'hwelel, e sell da reiñ d'an ezklañvourion an dro da aspiaouañ o barregezhioù micherel ha kedvuhez.

réagine ◇ **reagin** ◇ **reagin g.** Immunoglobulin a rizh IgE ar peurliesañ, enaozet evel respont da allergenoù ha dezhañ ar perzh lenañ ouzh koc'henn ar granulokit bazofil hag ar mastokit. Pa erwez an immunoglobulin lenet ouzh un antigen keñverek e vez dilaosket histamin ha danvezennoù gwazhiedwezhus all (dic'hreunennadur ar granulokit), o tevoudañ erwezhiadoù dreistkizidigezh a rizh I.

réanimateur ◇ **intensive care physician** ◇ **1 defraouer g. -ion 2 defraouer g. -ioù** 1 Mezeg arbennikaet karget da evshaat, e-doug ha goude ur gwezh surjaniel, ouzh arzalc'h pe ouzh assav ar c'hempouez bevedel argevezet gant ar c'hleñved, an darvoud pe an daraez surjaniel. 2 Ardivink arveret evit ar gwenterezh kalvezadel.

réanimation ◇ **intensive care** ◇ **defraouiñ, defraouerezh g.** Teskad an diarbennoù amkanet da assav an arc'hwelioù bevedel argevezet evit ur prantad (analañ, amredañ, mezbur, h.a.).

réassociation ◇ **renaturation** ◇ **adkevrediñ** Koublañ gwidennoù klokaus eus un DNA dinaturet a-rakwez. Alese ar c'henster *daznatuñ*.

rebelle

• *rebelle aux traitements* diwered outi nep mezegadur • *névralgie rebelle* nervost kilvers • *douleurs chroniques rebelles* laurioù henek kilvers • *toux rebelle* paz kilvers • *diarrhée rebelle* darc'hoal kilvers.

rebond ◇ **rebound** ◇ **dazlamm g.** Addinodadur ur c'hleñved war-lerc'h ur paouez yac'hadel.

rebreathing ◇ ◇ **rebreathing, klozwentañ** Araezad a c'hoarvez a lakaat ur gouzrec'h da analañ e klozamred, hep lemel ar CO₂ eus an aezhennoù ec'hanalet. Arveret e vez en diaraezñ hollek hag e-kerz prouadoù arc'hwelel analadel 'zo; neuze e vez angorzhet a-wechoù an aezhennoù o tont eus ur skeventenn, dredet e-doug ur bronkezanalventañ.

Rebuck : **fenêtre cutanée de ~** ◇ **Rebuck's test** ◇ **proud g. Rebuck, fenestr argroc'hene** **Rebuck** Proud amkanet da imbourec'hiñ an hangae kelligel. War-lerc'h reñviañ ar c'hroc'hene, arloadur lavnennoù gwer outañ a entremezioù savelek a gevaraez hennadiñ ha keñveriañ, goude livadur, ar c'helligoù dezalc'het warno : polinuklear ha goude mononuklear ha makrofag.

recalcification ◇ **recalcification** ◇ **adrazekaat** Diounit kalkiom e sell da vuiaat ar bec'h kalkiom er gwad pe ar gwiadoù, en eskern pegen.

récepteur ◇ **receptor** ◇ **1 paker g. -ioù 2 fraouva g. -où 3 buzer g. -ioù** 1 Ardivink en araez da bakañ un arhent (ha dre leterc'had, protein koc'hennel ensiket e golo ar gellig gouest da zegemer arhentoù ezkelligel, sl. 3). 2 Organ pe luniad arbennikaet (gorrefraouva, endonfraouaer, anunfraouva) fraouaet gant ur gentrigenn drobarzhel spesadel hag en araez da zelankañ un erwezh azas. 3 Luniad proteek, sezet e koc'henn pe kraoñenn ar gellig, dezhañ loadoù en araez da zegemer a-ziuz danvezhennoù endeuat pe ezdeuat, a zelank er gellig erwezhiou spesadel.

récepteur adrénérique ◇ **adrenergic receptor** ◇ **buzer adrenerc'her, adrenvuzer g. -ioù** Buzerioù loet e lies organ hag en araez da erwezhiñ ouzh hanteradoù kimiek adrenerc'her katekolamin. Kemm a lakaer etre an adrenvuzerioù α , fraouidik ouzh an noradrenalin, hag an adrenvuzerioù β , fraouidik ouzh an izoprenalin hag an adrenalin. Fraouadur ar buzerioù α a zevoud : gwazhiedstrishaat, krozhstrishaat, mabusvoll, hirisñ, heudiñ al loc'hañ pervezel. Fraouadur ar buzerioù β a zevoud : gwazhiedfrankaat, delaoskañ ar c'higennoù bronkezel, delaoskañ kigennadur ar grozh ha fraouaer ar gweredoù argrezwezher, broudwezher, renwezher ha talmwezher a'r galon.

récepteur de l'angiotensine II ◇ **angiotensin II receptor** ◇ **buzer an angiotensin II** Buzer kelligel sezet er galon, ar c'higennoù levn gwazhiedel, al lounezh, ar gaenuslounezhenn, an avu hag an nerveizhiad. Daou rizh a ziforc'her, ar rizh I hepken o hañvalout kaout ur gwerederezh bevedel a bouez. Gourzhalerioù anpeptidek ar buzerioù eus ar rizh I (ar *sartanioù*, ar penn stell anezho o vezañ al *losartan*) a vez arveret e prederiadur an uswask talmerel : tolc'hañ a reont ar reizhiad renin-angiotensin en un doare spesadekoc'h eget tolc'herioù enzim amdreñ an angiotensin.

récepteur cholinérique ◇ **cholinergic receptor** ◇ **buzer kolinerc'her, kolinvuzer g. -ioù** Buzer fraouidik ouzh gwered an aketilkolin loet e dibenn gwiennoù goudekangrennel ar reizhiad parasimpatek ha gwiennoù rakkangrennel ar reizhiadoù simpatek, parasimpatek, ar vezonuslounezhenn hag ar gigen rizennek. Bez' ez eus daou seurtad anvet buzerioù muskarinel ha nikotinel.

récepteur de la sérotonine ◇ **serotonin receptor** ◇ **buzer ar serotonin** Buzer fraouidik ouzh ar serotonin, hollvezant an dasparzh anezhañ.

récepteur des LDL ◇ **LDL receptor** ◇ **buzer an LDL** Buzer koc'hennel o lenañ an LDL (*Low Density Lipoprotein*) hag ouzh o lakaat da dremen er c'helligoù. Paot eo ar *b. k.* en avu, pegen.

récepteur dopaminérique ◇ **dopamine receptor** ◇ **buzer dopaminerc'her** Buzer fraouidik ouzh an dopamin ha bezant e gwazhied 'zo (lounezh ha pervez) hag er reizhiad nerval kreiz.

récepteur histaminique ◇ **histamine receptor** ◇ **buzer histaminerc'her** Buzer fraouidik ouzh an histamin. Tri seurt zo : ar buzerioù H₁ sezet er c'horrwazhied, er bronkez hag er pervez, o tevoudañ frankadur ar c'horrwazhied gant leiadur ar gwask talmerel hag argrezadur ar c'higennoù levn; ar buzerioù H₂ sezet er stomok, er galon hag er grozh, o tevoudañ borc'hadur ar stomok, argrezadur ar grozh ha kalonustead; ar buzerioù H₃ sezet en empenn.

récepteur hormonal ◇ **hormon receptor** ◇ **buzer hormon** Luniad molekul proteek bezant e kelligoù buzer 'zo, fraouidik a-ziuz ouzh gwerederezh un hormon.

récepteur insulínique ◇ **insulin receptor** ◇ **buzer insulinel, insulinvuzer** Buzer a gevaraez d'an insulín treuziñ ar gael gelligel hag a zo arouleviet ar gwerederezh gant ar gwadvec'h insulín.

récepteur morphinique ◇ **opiate receptor** ◇ **buzer morfinel, morfinvuzer** Buzerioù empenn fraouidik ouzh ar morfín ezdeuat hag endeuat.

- récepteur muscarinique** ◇ **muscarinic receptor** ◇ **buzer muskarinel, muskarinvuzer** Buzer reizhiad goudekangrennel ar reizhiad parasimpatik a zo ar fraouaat anezhi o tevoudañ : istead kalon, iswask, frankadur an talmerennigoù, argrezadur ar bronhez hag ar pervez.
- récepteur nicotinique** ◇ **nicotinic receptor** ◇ **buzer nikotinel, nikotinvuzer** Buzer azhentoù kangrennel an nervreizhiad emrennek hag ar juntad nervenn-kaher a zo ar fraouaat anezho o tevoudañ : kalonustead, uswask ha buanaat an amdonnegezh.
- récepteur plaquettaire glycoprotéique GP IIB/IIIA** ◇ **platelet glycoprotein IIB/IIIA receptor** ◇ **buzer pladanel glikoproteek GP IIB/IIIA** Buzer koc'hennel ma len ar pladan drezañ ouzh ar fibrinogen pergen hag ouzh ar barenn von Willebrand (integrin). — An heudadur anezhañ diwar-bouez danvezennoù diseurt a dolc'h neuze ar pladandazañ. Ar rumm pladanhazzerioù-se a vod heuderioù spedadell (peptidoù kiklek ha peptidvaneier) hag ivez heuderioù anspesadel a zo ar penn stell anezho an abkikimab, antikorf unskodien kimerek logodel, a zo arveret an ensikladur engwazhiennel anezhañ e-pad ar gwazhiedatelviñ kurunerel, war-benn hepkoriñ tromboz an dalmerenn.
- récepteur de reconnaissance** ◇ **antigen binding receptor** ◇ **buzer naouaat** Luniad dibarek sezet war c'horre limfokit 'zo (limfokit B pe yalc'hamplegat ha marteze ivez limfokit T pe toazonamplegat). Al luniadoù-se zo immunoglobulinoù (eleze antikorfoù) borc'het gant al limfokit hag a zo parzhioù eus o c'hochennoù (immunoglobulinoù a-goc'henn pe a-c'horre). Bennozh d'an antikorfoù-se, naouaat ha lenañ a ra an kez limfokit an antigenoù a zo dav dezho festañ pe distrujañ (sl. *anticorps* : *site* ~, *cellules immunocompétentes*).
- récepteur sensitif** ◇ **serotonin receptor** ◇ **fraouva g.** Dibenn an nervennoù o tegemer fraouadurioù treuzkaset gant ar gwiennoù santout etrezek ar mel.
- récepteur soluble de la transferrine** ◇ ◇ **buzer hezelezh an transferrin** Tamm (dewerc'het dre an disfaoutañ enzime) eus buzer koc'hennel an transferrin, protein sezet war c'horre an holl gelligoù, an eritrokrit lakaet er-maez. Kresk ar bec'h anezhañ zo azeon un negezh houam arc'hwelel. Deurus e teu da vezañ e zezventañ pa vez diaes da zesteriañ leiadur ar gwadveizvec'h ferritin.
- récepteur de la vasopressine** ◇ **vasopressin receptor** ◇ **buzer ar vazopresin** Luniad molekul sezet war goc'henn ar gellig ha fraouidik ouzh gwerederezh ar vazopresin. Kemm a lakaer etre ar *buzerioù V1* kevreet ent arc'hwelel ouzh ur fosfolipaz C ha bezant e kigennoù levn ar gwazhied, e kahergelligoù ar galon hag ar pladanoù hag ar *buzerioù V2*, kevreet ouzh un adenilkiklaz koc'hennel ha bezant el lounezh.
- réceptivité** ◇ **susceptibility** ◇ **1 ha 2 tizhadusted b., darbennusted b.** 1 Gouested ar bevedeg da zarbenn anglevadoù devoudet gant broudadoù diavaez pe diabarzh. 2 Kizidigezh vras pe vrasoc'h ur bevedeg pe un hinienn da zastum kleñvedoù 'zo.
- receptologie** ◇ **receptorology** ◇ **buzeroniezh b.** Rann ar vevoniezh o plediñ gant studi ar buzerioù.
- récessif** ◇ **recessive** ◇ **enkilek aa.** A-zivout ur c'henenn oc'h erzerc'haat an doareennoù en he dalc'h gant ma ve bezant war an daou gromozom eus ar re; heñvel dra, e reer *doareenn enkilek* eus an doareenn treuzkaset dre an kez genenn ha *mod enkilek* eus mod treuzkas ar c'hleñvedoù hêrezhel (sl. *dominant*).
- récessivité** ◇ **recessivity** ◇ **enkilegezh b.** Perzh ur c'henenn na erzerc'h nemet gant ar gouzrec'h unreek.
- récessus** ◇ **recess, recessus** ◇ **aspieg g.** Er gorfadurezh, poullig, pukadenn pe kavennig.
- receveur** ◇ **recipient** ◇ **roadour g.** Gouzviad diounezet dezhañ un treuzskuilhadur gwad, un imboud gwiad pe un treuzplantadur organ. Anv a vez eus *hollroadour* (Gl. *receveur universel*) evit ur gouzrec'h eus ar rizh gwad AB, gouest da zegemer un treuzskuilhadur a-berzh nep gouzrec'h, rak e wadveiz, hep aglutinin, ne zazglud hematien ebet.
- recherche biomédicale** ◇ **biomedical research** ◇ **imbourc'h g. bevoniel ha mezegel** Arnoderezh renet war an den e sell da ziorren an anaoudegezhioù bevoniel ha mezegel.
- rechloruration** ◇ ◇ **dazkloridekaat** Ebarzhiñ kloridenn natriom en ur bevedeg, ma ra diouer evit un darn.
- rechute** ◇ **relapse** ◇ **azkouezh g.** Addinodadur arouezioù ur c'hleñved e deroù an diglañvañ, abretoc'h eget an *arreadur* hag e kemm diouzh an *adfeilh*, rak n'eus ket a arbenn nevez gant an azkouezh.
- récidive** ◇ **recidivation** ◇ **adfeilh g.** Addinodadur ur c'hleñved war-lerc'h ur prantad hir pe hiroc'h a yec'hed klok. E kemm diouzh an *azkouezh* ez eus gant an *adfeilh* un arbenn nevez, ur poreadur nevez da skouer (sl. *rechute, récurrence*).
- récidivité** ◇ **recurrence rate** ◇ **adfeilhusted b.** Perzh da adfeilhañ, evit ar yoc'hennoù pergen.
- Recklinghausen** : **maladie ou neurofibromatose de ~** ◇ **Recklinghausen's disease, neurofibromatosis** ◇ **kleñved g. Von Recklinghausen** pe **neurofibromatoz Recklinghausen** Kleñved hêrezhel aotozomek trec'hek, klok e werc'hennusted hag argemmus e erzerc'hausted. Naous eo dre gevredet brizhennoù kroc'hen livegat (anvet "brizhennoù kafé dre laezh"), yoc'hennoù stirek ar- ha dangroc'henek ha neurofibromoù sezet war dreug nervennoù trobarzhel, a-glopenn — an nervenn a-velc'houedenn dreist holl — pe a-livenn, en arvar da zevoudañ direizhoù nervel. Emañ an anaez-se e-touez ar fakomatozioù.
- reclassement** ◇ **rehabilitation** ◇ **erougonañ** Lakaat un ezklañvour pe un nammad e-tailh da vezañ gouest d'ober ul labour disheñvel diouzh an hini kent.
- reclassement professionnel** ◇ **rehabilitation** ◇ **adstaelañ micherel** Enstaelañ en ur vicher nevez tud o deus ranket dilezel o micher kent en arbenn eus un nammad arzeuet.
- Reclus** : **maladie de ~** ◇ **cystic mastitis** ◇ **kleñved g. Reclus** (sl. *kystique* : *maladie* ~ *de la mamelle*).

recombinaison génétique ◇ **genetic recombination** ◇ **adkevosodiñ hilel** Daskemm dasparzh ar gen o tec'han dinodadur genotipoù nevez. An adkevosodiñ hilel a zevoud un trevnadur eus an doarenoù hêrezhel en un urzh disheñvel diouzh an hini o revout gant ar “gerent”. C'hoarvezout a ra an adkevosodiñ hilel, ent dibarek, e-doug ar meioz (sl. *kroazkemman* Gl. *enjambement*).

recombinaison génétique in vitro ◇ **genetic recombination** ◇ **askevosodiñ hilourel** En hilouriezh, embregouriezh daz-veañ ar gen dre ensoc'hañ un dafar hilel estren e DNA ur gellig vev.

recombinant ◇ **recombinant** ◇ **askevosodat** aa. Dewerc'het dre hilouriezh.

recommandations de pratique clinique (RPC) ◇ ◇ **ergemennadoù** l. (g.) **a embreg klinikel** Erbedadennoù danzeet ent hentennek gant an Amsez Riezel Enkredekaat hag Endalañ er Yec'hed (AREAY) ha goude gant Aotrouniezh Uhel ar Yec'hed (AUY), amkanet da skoazellañ an embregour da zibab an arouelioù azasañ en amveziadoù klinikel roet. Eztennet eo anezho an Daveoù Mezegel Enebadus (DME) gant sinerion ar C'henouestl mezegel.

recompression ◇ **recompression** ◇ **adamwaskañ** En ur gaelog arbennik, arloañ un amwask uheloc'h eget amwask an aergelc'h da c'houziadiad o c'houzañ diwar strafuilhoù ec'h amwaskañ o tistreiñ re vuan d'an aerwask reol, goude bezañ chomet dindan uc'hamwask, en ur gaelog, en ur splujwisk pe e rezspluj.

recon ◇ **recon** ◇ **rekon** g. Elfenn vihanañ ar c'hromozom en araez da adkevosodiñ. Arlakaet e vez e ve kevatal d'un nukleotid.

reconstitution immunitaire : syndrome inflammatoire de ~ ◇ **immune reconstitution inflammatory syndrome** ◇ **azoniad** g. **foel diwar adsavelañ hangae** Stroll erzerc'hadoù klinikel a rizh foel arsellet goude un nebeut sizhunvezhioù eus ur mezegadur enepretrovirus gant ur gouziadiad tizhet gant an haza ha hangaeastalet kenan, pa adkresk bec'h al limfokit CD4. M. A. French a zigemm anezho ur seurtad poreel kentrat, terzhiennel, arsellet gant ar gouzrec'h kenboreet (Mikobakteri, kitomegalovirus) ha daou seurtad diwezhat, sarkoidozek hag a rizh unanhangaeel.

reconst-

- *reconstitution des pertes de substance de la face* dazluniañ an dremm goude koll danvez
- *reconstruction de la paupière* dazluniañ ar valvenn
- *reconstitution chirurgicale de la rotule* dazluniañ surjianeel ar padelleg
- *reconstituer l'urètre* dazluniañ ar c'han troazh
- *chirurgie reconstructive* surjianerezh dazluniañ.

recouvr-

- *recouvrant l'acrosome du spermatozoïde* o kabellañ akrozom ar spergellig
- *une écorce grise recouvrant de la substance blanche* ur bluskenn louet o pallennañ ur steuñvenn wenn
- *terme général recouvrant un ensemble* termen hollek oc'h erdalañ un teskad.

recrudescence ◇ **recrudescence** ◇ **remortad** g. Gwashadur ur c'hleñved war-lerc'h un didorr berbad.

recrutement ◇ **recruitment** ◇ **dazgrenaat** Gant ur gouzrec'h tizhet gant anafoù an nervenn gempouez-kleved, distro ar c'hleved reol en tu all d'ur c'hreñvder roet a 'r stenioù. En degouezh-se, pa gresk kreñvder ar stenioù, e steuz ar vouzarded : ar skouarn glañv a aspiaou he arc'hwel hag, adalek ur gwehin bennak, a glev evel ar skouarn vonan. Anadenn Fowler eo (1936). Pa vez anafoù taboulin, nerverl kefel pe greiz n'eus ket anezhi : ar forc'had etre kleved an div skouarn a chom digemm, evit forzh petore kreñvder ar sten.

rectal, recto-

- *alimentation rectale* boueta youlc'hel
- *ampoule rectale* gloestr ar youlc'h
- *anorectal* fraezh ha youlc'h, fraezh-youlc'h
- *colorectal* kolon-youlc'h
- *entéroréctal* pervez-youlc'h
- *par voie rectale* dre ar youlc'h, ent youlc'hel
- *pelvi-rectal* koaez-youlc'h
- *périoréctal* tro-youlc'h
- *prolapsus rectal* islink ar youlc'h
- *rectovaginal* youlc'h-gouin
- *recto-utérin* youlc'h-kroz
- *vagino-rectal* youlc'h-kroz
- *vésicorectal* youlc'h-c'hwezhi-gell.

rectalgie ◇ **rectalgia** ◇ **fraezhost** b. (sl. *proctalgie*).

rectite ◇ **rectitis** ◇ **youlc'hfo** g. (sl. *proctite*).

rectocèle ◇ **rectocele** ◇ **youlc'hogad** g. (sl. *colpocèle* et *proctocèle*).

rectococcygien ◇ **rectococcygeal** ◇ **youlc'h-belost** aa. A-zave d'ar youlc'h ha d'ar belost.

rectococcyxie ◇ **rectococcyx** ◇ **Aanlenañ youlc'h-belost, youlc'hbelostAanlenañ** (sl. *proctococcyxie*).

rectocolite ◇ **rectocolitis** ◇ **youlc'hkolonfo** g. Tanienn diaser ar youlc'h hag ar c'holon.

rectocolite hémorragique ◇ **ulcerative colitis** ◇ **youlc'hkolonfo gwadliñvek** Kleñved dianav e orin, o tedreiñ dre resmiadoù arreat naouus dre un azoniad flusel glaourwadiñvel. Al luc'hengweliñ a ziskouez ur glaourgenn darwazhiiek gwadliñvek, o wadañ ouzh an disterañ stokadenn, gant lies gouliez. Arvarek eo an erbedad.

rectopexie ◇ **rectopexy** ◇ **youlc'hAanlenañ** (sl. *proctopexie*).

rectoplicature ◇ **rectoplication** ◇ **youlc'hkilweañ** Gwezhiadenn a c'hoarvez a grizañ glaourgenn ar youlc'h, e degouezh izad ar youlc'h.

rectorragie ◇ **proctorrhagia** ◇ **youlc'hwadliñvañ** (sl. *proctorragie*).

rectorrhaphie ◇ **rectorrhaphy** ◇ **youlc'hdlita** (sl. *proctorrhaphie*).

rectoscopie ◇ **rectoscopy** ◇ **youlc'hengweliñ** (sl. *proctoscopie*).

rectosigmoidite ◇ **proctosigmoiditis** ◇ **youlc'hsigmafo** (sl. *proctosigmoidite*).

- rectosigmoïdoscopie** ◇ **proctosigmoidoscopy** ◇ **youlc'hsigmaengweliñ** (sl. *proctosigmoïdoscopie*).
- rectostomie** ◇ **rectostomy** ◇ **youlc'hezforzhañ** (sl. *proctostomie*).
- rectotomie** ◇ **rectotomy** ◇ **youlc'henbenañ** (sl. *proctotomie*).
- recto-urétral** ◇ **rectourethral** ◇ **youlc'h-kantroazh** aa. A-zave d'ar youlc'h ha d'ar c'han troazh.
- recto-utérin** ◇ **rectouterine** ◇ **youlc'h-krozh** aa. A-zave d'ar youlc'h ha d'ar grozh.
- rectovaginal** ◇ **rectovaginal** ◇ **youlc'h-gouin** aa. A-zave d'ar youlc'h ha d'ar gouin.
- rectovésical** ◇ **rectovesical** ◇ **youlc'h-c'hwezhi-gell** aa. A-zave d'ar youlc'h ha d'ar c'hwezhi-gell.
- rectum** ◇ **rectum** ◇ **youlc'h g.** Lodenn dibenn ar vouzellenn dev o vont eus ar rannbarzh youlc'h-sigma d'ar fraezh. Kemm a lakaer etre ar rann uhelañ — ar youlc'h a-lestr, a ampar ar frankaenn bellek anezhañ gloestr ar youlc'h —, hag ur rann izelañ — ar youlc'h a-c'harbedenn, pe kanol ar fraezh —.
- récurrence** ◇ **recurrence** ◇ **arreadegezh** b. Doare ar pezh a zo arreadek, evel adkrog dedroat ur pore a hañvale bezañ pare, hep hañval bet poreet a-nevez.
- récurrent** ◇ **recurrent** ◇ **1 kilreder** aa. **2 arreadek** aa., **arreat** aa. 1 A zistro war-gil pe d'e orin. 2 A erzerc'h, a zarvez en-dro da heul spanaennoù.
- recurvatum** ◇ **recurvatum** ◇ **rakkrommadur g.** Dreistastennadur ezreol ur c'henvell (sl. *genu recurvatum*).
- Redon : drain de ~** ◇ **suction drain** ◇ **gwehenell b.** **Redon** Tuellenn bolietilen, outi lies toull en ur penn, ar penn all o vezañ ereet ouzh ur flask ec'haezhet war-benn kevaraezañ ur suc'hadur diastal.
- redressement** ◇ **correction** ◇ **dereizhañ, diwariañ** gwezhiadenn surjaniel amkanet da adlakaat un organ gwariet en e loadur reol.
- redresseur** ◇ **rectifying device** ◇ **bruskeunell b. -ioù** Korfenn amkanet da zerc'hel ar bruskeunell.
- réductase** ◇ **reductase** ◇ **reduktaz g.** Nep enzim o treluskañ an diren.
- réductible** ◇ **reducible** ◇ **direadus** aa. En araez da vezañ direet.
- réduction** ◇ **reduction** ◇ **1 2 3 diren 4 leiaat** 1 Er gimiezh, lemel oksigen d'un aozad; en un diarsell hollekoc'h ez eo an direadur un dazgwered kimiek ma vez gounezet elektron gant un pe lies atomenn eus ur volekulenn pe eus un ionenn. 2 Er surjianerezh, adlakaat en e lec'h un organ dilec'hiet, un askorn torret, un ogad pe penn disvellet ur c'henvell. 3 En hiloniezh, direadur ar c'hromozomou : tremen ar gellig eus ar stad diploidel — ma 'z eus er graoñell *2n* kromozom (46 gant an den) — d'ar stad haploidel — ma 'n eus mui nemet *n* kromozom (23 gant an den) —, e-doug ar meioz, anvet ivez *emrannañ direüs* (sl. *division réductrice*). 4 Heñvelster gant *bihanaat, digreskiñ*.
- Réduviidés** ◇ **Reduviidae** ◇ **Reduviideged l. (g.)** Kerentiad amprevaned eus urzhad an Hemipter, isurzhad an Heteropter, ennañ spesadoù 'zo gwadezat kiriek da dreuzkas an tripanozomiaz amerikan (sl. *Chagas : maladie de ~*).
- redux** ◇ **redux** ◇ **redux** Ger latin o talvezout a zo *distro*, arveret evit un anaf a anad en-dro ent emdarzh pell pe belloc'h war-lerc'h ar pare hañvalat anezhañ.
- Reed : cellule de ~** ◇ **Reed-Sternberg cell** ◇ **kellig b.** **Reed-Sternberg** Kellig usventek (eus 25 da 50 µm), dezhi ur graoñell liesel ec'honek, e-kerz ar mitoz alies.
- Reed : opération de ~** ◇ **Reed's operation** ◇ **oberatadenn b.** **Reed** Argoulmañ ur wazhienn evit prederiadur surjaniel un deuc'hvozhell korzenn-vierez.
- rééducateur** ◇ **reeducator** ◇ **addiorreer g. -ion** Hinienn arbennikaet en addiorren.
- rééducation** ◇ **reeducation, rehabilitation** ◇ **addiorren** Teskad an araezioù amkanet da gevaraezañ ur gouzrec'h tizhet gant un anaez dilañsus aspiaouañ e darn pe en holl e c'halloudezhioù. Ar peurliesañ e vez dedalvezet an addiorren da c'houziviaded o c'houzañv strafuilhoù kaherel pe kenvellel, gant andrafted arc'hwelel, da ankomezion ha da vredglañvourion.
- rééducation fonctionnelle (motrice)** ◇ **functional reeducation** ◇ **addiorren arc'hwelel (loc'hadel)** Teskad an hentennoù o amkan gwellaat pe gempouezañ un namm loc'hadel pe arc'hwelel.
- rééducation fonctionnelle et réadaptation** ◇ **functional reeducation and rehabilitation** ◇ **addiorren arc'hwelel hag azgouestaat** Diskiblezh vezegel kaougantet gant un testi studi arbennik, ensavet e Frañs e 1965 evit kemer lec'h ar vezekniezh fizikel.
- ré-entrée ou rentrée** ◇ **reentry** ◇ **adenankad g.** Broudadur kizreat un darn eus ar c'halongaher ma 'z eo arsavet an tredanren dre un uspad eus al lankad anvrouadel (anvrouadavezh). An anadenn-se a zispleg dreistsistolioù 'zo hag ivez gougrenoù ha kalonusteadoù kofigel 'zo (sl. *post-excitation : syndrome de ~*).
- Reese-Blodi : dysplasie rétinienne de ~** ◇ **Reese-Blodi dysplasia** ◇ **luc'hsaeviwe g.** **Reese-Blodi** Teskad kammneuziadoù, en o zouez ezreolderioù lagadel (gaouc'hliom an div luc'hsae) ha flugezel liesel (dilerc'hegezh kefredel gant empennfoeñv ha korrgloppenegzh, usniver bizied, troad potin, boulc'h, treuzwar, kammneuziadoù kalonel, koazhadel ha troazhadel).
- références médicales opposables (RMO)** ◇ **opposable medical reference** ◇ **daveannoù mezegel enebadus (DME)** Araez mestroniañ an dispignoù arouelañ e Frañs. Adalek 1993 ez eus enno un ergemnadoù bennak a bleustroù mezegel mat en

erdu ar frankvezeion, talvoudet gant an Amsez Riezel evit Diorren an Andalañ er Vezekniezh (ARDAM), da heul gant an Amsez Riezel Enkredekaat hag Andalañ er Yec'hed (AREAY) ha goude gant Aotrouniezh Uhel ar Yec'hed (AUY) hag a "glot gant arouelioù hag erskrivadoù diamkan en ervez da vezañ enebet gant ar gevelerion gendivizadel (c'hweluniadoù mezege, kretadur kleñved) ouzh embreg an erskriverion".

Refetoff : syndrome de ~ ◇ **Refetoff's syndrome** ◇ **azoniad g. Refetoff** Teskad kammneuziadoù gant ur bouzarmuderezh, un dilerc'h savderel hag askornel, talpennoù dluzhet, ur pennsac'h hag ur feur plasmatek uhel a hormonoù skoedel. An azoniad-se, tiegezhel ha prin, zo devoudet gant ur vizarbennusted c'hougorfennel ha trobarzhel ouzh an hormonoù skoedel.

réflectivité ◇ **reflex excitability** ◇ **damouezh g.** Perzh, piaouet gant parzhioù 'zo a 'r c'horf, bezañ poent loc'hañ ur gwezh damougek, pa vezont broudet.

réflexe ◇ **reflex** ◇ **1 damoug g. 2 damougek aa. 3 damougel aa.** 1 Nep erwezh andiarvenn ha kentizhek a-berzh luniadoù bev diwar genitradur ur fraouva savelet. 2 Gant perzh an damoug. 3 A-zave d'an damoug.

réflexe abdominal ◇ **abdominal reflex** ◇ **damoug kroc'hen kofel** Argrezadur untu kigennoù speur ar c'hof delanket gant kentrigradur kroc'hen ar c'hof en tu keñverek, a-us pe a-is d'ar begel.

réflexe achilléen (ou calcanéen) ◇ **Achilles's tendon reflex** ◇ **damoug stirenn ar seul** Astenn an troad war ar c'har delanket gant kiziata stirenn ar seul.

réflexe acide de Pavlov ◇ **Pavlov's reflex** ◇ **damoug trenk Pavlov** Borc'hadur ilgreizel puilh devoudet gant ebarzhiñ un drenkenn en daouzegenn.

réflexe acoustico-palpébral ◇ **cochleo-palpebral reflex** ◇ **damoug melc'houedenn-malvenn** Damoug o c'hoarvezout eus gouzizad trumm ar valvenn grec'h ouzh ur sten kreñv dic'hortoz (sl. *ochléopalpébral : réflexe ~*).

réflexe acoustique ◇ **acoustic reflex** ◇ **damoug stenel** Argrezad kigennoù an daboulin delanket gant dec'havael ur sten kreñv.

réflexe anal ◇ **anal reflex** ◇ **damoug fraezhel** Argrezad kelc'hstrishaer ar fraezhel delanket gant broudadur kroc'hen ribl ar fraezh

réflexe antagoniste ◇ **antagonistic reflexes** ◇ **1 damoug gourzhaler 2 damoug ar gourzhaler** 1 A-gevenep da *damougoù kedaler*, damougoù o kengevezañ evit ar genforzh dibenn. An kez kenforzh ne c'hell ket bezañ sez diaser erwezhioù ginwered. E-se e sour un damoug plegañ laureraezus war an damoug deheñv miotatek. 2 Damoug ar gourzhalerioù. Argrezadur ur gigen a c'hoarvez a-ser gant diargrezadur ar gourzhaler anezhi. Bez' ez eo pennaenn nervaouerezh ginlank Sherrington.

réflexe d'attitude ◇ **attitudinal reflex** ◇ **damoug loadurel** Damoug tantel o savelañ an dargrezadoù kigennek rekis da zerc'hel kempouez ar c'horf (sl. *poussée : épreuve ou phénomène de la ~*).

réflexe d'axone ou axonal ◇ **axon reflex** ◇ **damoug akson(el)** Damoug delanket hep dasperzhiadur an nervgreizenn; ar broudadur trobarzhel a askennfe a-hed an nervviennoù hag, kent diraez ar c'hreizennoù livennvele, a ziskennfe, dre ur skourr eus kavaz an nervenn, etrezek an organ enodiñ (gwazhiedenn, pervez, c'hwezhiell).

réflexe bicipital ◇ **biceps reflex** ◇ **damoug kigen daoubennek ar vrec'h** Plegad an arvrec'h delanket gant kiziata stirenn kigen daoubennek ar vrec'h.

réflexe bulbocaverneux ◇ **bulbocavernous reflex** ◇ **damoug kigen ongonenn-keviaouek** Argrezad ar gigen ongonenn-keviaouek delanket gant piñsañ mezenn pe talbenn kein ar c'halc'h.

réflexe cochléaire ◇ **cochlear reflex** ◇ **damoug melc'houedennel** Gwezh andiarvenn devoudet gant klevout ur sten; ar steuz anezhañ a erzerc'ha natur vevedel ur vouzarded.

réflexe conditionné ou conditionnel ◇ **conditioned reflex** ◇ **damoug darblegadel** Kemm a lakaer etre an damoug glez (pe *andarblegadel*), gwezh damougek ordinal ganedigel ma emañ un nervgreizenn danbluskennel (hirvel, mel) o tazperzhiañ, hag an damoug darblegadel (Pavlov) pe bredel (Ch. Richet), gwezh damougek hiniennel, arzeuat, ma tazperzh pluskenn an empenn.

réflexe consensuel ◇ **crossed reflex** ◇ **damoug keflank** Ar gouloù o tizhout ul lagad a zevoud el lagad a-ciltu, na pa ve hennezh en deñvalijenn, un damoug mabel kevatal d'an hini el lagad sklerijennet. Argrezad ar mab lagad diwar sklerijennadur ul lagad hepken zo gwanoc'h eget an hini devoudet gant sklerijennadur an daou lagad.

réflexe cornéen ◇ **corneal reflex** ◇ **damoug kornsaeel** Serridigezh daoudu ar malvennoù gant krec'hduañ ar voull lagad, delanket gant touch ar gornsae.

réflexe crémastérien ◇ **cremasteric reflex** ◇ **damoug ar gigenn istribilher** Argrezad ar gigenn istribilher o tec'han askenn ar glidenn gant ar gourev hag angriz muzell vras ar c'hourzh gant ar venev, delanket gant broudadur amwiskadoù tu diabarzh ar vorzhed.

réflexe cubitopronateur ◇ **ulnar reflex** ◇ **damoug palvstouer** Palvstou an dorn diwar giziata stilhon an helmo.

réflexe cuboïdien ◇ **Bechterew-Mendel reflex** ◇ **damoug diñsegel** Astennidigezh a-gil ar pevar biz troad diwezhañ, ent reol pa vez skoet kil an troad e par an diñseg.

réflexe cutané, osseux ou tendineux ◇ **cutaneous, bone, tendon reflex** ◇ **damoug a-groc'hen, a-askorn, a-stirenn** Damougoù delanket dre vroudañ lec'hiennoù 'zo a 'n amwiskadoù, gant kiziata eskern 'zo, stirennoù 'zo, hag oc'h erzerc'hañ dre un argrezad kaherel diarvenn, trumm ha berrbad.

- réflexe cutané plantaire** ◇ **plantar reflex** ◇ **damoug sol troad** Plegad a-sol eus ar meud troad hag ar bizied troad all diwar vroudedigezh sol an troad, a ziadreñv da ziaerok; tuginadur an damoug-se a vez graet arouez Babinski anezhañ (sl. *Babinski : signe de ~*).
- réflexe de défense** ◇ **defence reflex** ◇ **damoug difenn** Anvet ivez *damoug laureraezus*, erwezh andiarvenn devoudet gant ur gentrigadenn (gweledel, klevedel, kroc'heneh, h.a.) noazus, o kevaraeziñ tec'hout diouti. Sk. : erdenaer skilfoù loened 'zo, fiñvoù kravat ha skubañ el lec'hienn heget. Spisoc'h eo an erwezhiou-se pa vez ezvezant ar reoliñ pluskennel. En imbourc'h klinikel e vezont arsellet e degouezh a skejadur pe amwask ar mel a-livenn gant gourdastrizhegezh : arouezioù a velemgefren eo ez int. Damoug ar plegerioù a c'hoarvez eus an triemden-mañ : an troad o plegañ war ar c'har, ar c'har war ar vorzhed hag ar vorzhed war al lestr. Devoudet eo dre biñsañ kreñv ar c'hroc'hen pe ar c'higennoù pe dre blegañ a-sol ar bizied troad. Dibaotoc'h e c'hoarvez an damoug difenn eus argrezadur ar c'higennoù astenner en tu broudet pe en tu kevenep zoken.
- réflexe extéroceptif** ◇ **exteroceptive reflex** ◇ **damoug gorrefraouadel** Erwezh a-berzh kigennoù pe gwagrennoù ouzh fraouadoù diavaez. An erwezh a sell peurlivenn ouzh lies stroll kigennoù, dezho un argrezañ kenurzhet gant neuz un erwezh difenn enep ar fraouadenn noazus. Un damoug kemplezh eo, oc'h emplegañ neuron dazetreer o tasperzhiañ.
- réflexe du fascia lata** ◇ **tensor fasciae latae reflex** ◇ **damoug ar faskienn ledan** Anvet ivez *damoug solet melet* : argrezad kigenn stenner ar faskienn ledan o tevoudañ astenn ar c'har ha pellaat ar vorzhed, delanket gant skrabañ riblenn diavaez sol an troad, kevret ar peurliesañ gant plegad ar bizied troad.
- réflexe fessier ou glutéal** ◇ **gluteal reflex** ◇ **damoug peñsel** Argrezad kigennoù ar peñs gant askennad nant ar peñs, devoudet gant broudadur kroc'hen ar peñs.
- réflexe H (Hoffmann)** ◇ **H reflex** ◇ **damoug H** Damoug unsinapsel delanket gant fraouaat tredanel eeun (tregroc'heneh) an nervenn degasat.
- réflexe idiomusculaire** ◇ **muscular reflex** ◇ **damoug hangigennel** Argrezad trumm hag andiarvenn ur gigen delanket dre he c'hiziata eeun.
- réflexe intéroceptif** ◇ **deep reflex** ◇ **damoug endonfraouadel** Damoug o loc'hañ eus un dibenn nervel sezet e diabarzh ar c'horf (sl. *intérocepteur*).
- réflexe mamillo-aréolaire** ◇ ◇ **damoug rodenn ar vronn** Damoug blevloc'hadel kigennoù rodenn ar vronn.
- réflexe massétérin** ◇ **jaw reflex** ◇ **damoug chagellerel** Heñvelster gant *damoug elgezh*, serridigezh ar genoù delanket dre giziata an elgezh (argrezad ar gigen chageller).
- réflexe médio-plantaire** ◇ **mediopantar reflex** ◇ **damoug kreiz-sol** Astennidigezh an troad war ar c'har, gant plegad ar bizied troad, delanket gant kiziata parzh kreiz sol an troad.
- réflexe médio-pubien** ◇ **pubo-adductor reflex** ◇ **damoug kreiz-kaezour** Argrezad daoudou kigennoù nesaer ar vorzhed ha kigennoù ar c'hof, delanket dre giziata juntad ar c'haezour.
- réflexe monosynaptique** ◇ **monosynaptic reflex** ◇ **damoug unsinapsel** Damoug oc'h engwezhañ ur sinaps hepken. Da skouer en damoug unsinapsel loc'hadel, ar gwiennnoù degasat angorzhet o tont eus ar gwerzhidoù nervgaherel a genvell war-eeun, hep neuronenn etreat, er c'hornioù araok ar mel, gant kelligoù an neuron loc'hañ o c'houlankañ ar gigen ma teu ar gwiennnoù degasat-se. Ampled respont an damoug unsinapsel loc'hadel ouzh ur fraouadenn miret arstalek zo e dalc'h niver an neuronoù angorzhet en damoug ha live broudadusted an kez neuronnoù.
- réflexe myotatique** ◇ **myotatic reflex** ◇ **damoug miotatek** Argrezad tanel ar gigen delanket gant an deheñv anezhi he unan.
- réflexe naso-palpébral** ◇ **nasopalpebral reflex** ◇ **damoug fri-malvenn** Heñvelster gant *damoug Guillain*, serridigezh daoudou ha diaser ar malvennoù delanket gant kiziata gwrizienn ar fri. Ur seurtad damoug trigevell-malvenn eo.
- réflexe neuro-endocrinien** ◇ **neuroendocrine reflex** ◇ **damoug nervenborc'hadel** Damoug dezhañ da zisoc'h fraouadur ur wagren enborc'hat.
- réflexe oculocardiaque** ◇ **oculocardiac reflex** ◇ **damoug lagad-kalon** Gorrekadur ar pouz gant leiadur ar gwask talmerel dec'hanet dre amwaskañ ar bouloù lagad. Reñverek e c'hell bezañ an damoug-se, eleze e tigresk niver ar pouzadennoù eus 20 ha muioc'h zoken (degouezhiou 'zo a bennsac'h bourbellus, a stadoù vagotonek), e-lec'h eus 4 da 12 dre vunud; eilpennet e c'hell bezañ, e gerioù all : ar pouzadennoù a zeu da vezañ herrekoc'h eget a-gent e-pad amwaskadur an daoulagad (stadoù usreek simpatek, degouezhiou bec'hiegi vonan da welout).
- réflexe œsophago-salivaire** ◇ **œsophagosalivary reflex** ◇ **damoug halviñ treizherel** Halviñ puilh devoudet gant broudadur treloc'hel an treizher. C'hoarvezout a ra an damoug-se dre hantererezh an nervenn dispis.
- réflexe olécranien** ◇ **triceps reflex** ◇ **damoug ar gern ilin** Astenn an arvrec'h delanket gant kiziata stirenn kigen drifennek ar vrec'h. A se an heñvelster : *damoug kigen drifennek ar vrec'h*, berroc'h *damoug trifennek*.
- réflexe optico-palpébral** ◇ **optico-facial reflex** ◇ **damoug gweledel-malvenn** Gwilc'hañ daoudou ar malvennoù devoudet gant merzhidigezh a-daol ur gouloù kreñv pe gant donedigezh trumm un ergoren er gwelvaez.
- réflexe opto-mélanocyitique ou opto-pituito-mélanocyitique** ◇ ◇ **damoug optomelanokitek** Damoug nervenborc'hadel dezhañ ur poent loc'hañ gweledel, ur c'horvell gougorfennel, a ra meiz war engwerc'hadur al livegenn (melanokinez) dindan delanvad ar gouloù, pe eeunoc'h kemm liv mellkeineged 'zo (raneged, stlejviled ha pesked) hervez livezh ar gouled ma emaint.

- réflexe otocardiaque** ◇ ◇ **damoug skouarn-kalon** Gorregezh ar pouzl devoudet gant ur broudadur skañv eus ode diavaez ar c'hleved, da geñveriañ gant an damoug lagad-kalon.
- réflexe palmo-mentonnier** ◇ **palmomentary reflex** ◇ **damoug palv-elgezh** Argrezad untu kigennoù an elgezh pa vez fraouatet palv an dorn eus an hevelep tu. Bonan eo an damoug-se e-pad mizvezhioù kentañ an hoali.
- réflexe paradoxal** ◇ **paradoxical reflex** ◇ **damoug diac'hinek** Fiñv damougek a-c'hin d'an hini dec'honet boas gant kiziata ur stirenn. E-se, en ilin, kiziata stirenn kigenn drifennek ar vrec'h a zevoud plegad an arvrec'h e-lec'h an astennad anezhi ; er glin, kiziata stagell ar padelleg a zevoud plegad ar c'har e-lec'h an astennad anezhi. Un arouez a isdamoug pe a andamoug e ve.
- réflexe patellaire** ou **réflexe rotulien** ◇ **patellar reflex** ◇ **damoug ar padelleg** Astenn a-daol ar c'har war ar vorzhed devoudet gant kiziata stagell ar padelleg. Ditouriñ a ra stad ar mel en ul live o klotañ gant eil, trede ha pevare gwriazienn al livenn dargreiz.
- réflexe péronéo-fémoral postérieur** ◇ ◇ **damoug spilhenn-morzhed adreñv** Argrezad kigennoù talbenn adreñv ar vorzhed devoudet gant kiziata penn ar spilhenn.
- réflexe pharyngé** ◇ **pharyngeal reflex** ◇ **damoug ar c'hargadenn** Argrezad ar c'hargadenn ha heugenn devoudet gant broudadur ar c'hargadenn.
- réflexe piloteur** ◇ **pilotory reflex** ◇ **damoug blevloc'hadel** Hirisiañ ar blev hag anadennoù an houpiñ devoudet gant broudadur tachadoù 'zo, evel rannbarzh ar gouzoug pe ar gazel, gant broudadoù skiantennel (trouzioù displijus) pe gant stadoù bredkantaezel (efreizh, fromoù liesseurt). Studi an damoug-se a urzh simpatek a vez dedalvezet da zeznouañ sez nervanaezioù 'zo.
- réflexe polycinétique** ◇ ◇ **damoug liesfiñvadec** Damoug a-stirenn naous dre an erwezhañ e rezh un arread argrezadoù.
- réflexe de posture** ◇ ◇ **damoug loadurel** 1 Damoug loadurel hollek (sl. *réflexe d'attitude*) 2 damoug loadurel lec'hiek, heñvelster : *argrezañ diac'hinek Westphal* ur gigen, devoudet gant denesadur gouzañvat he fentoù enlanañ (da skouer, evit kigenn daoubennek ar vrec'h, gant plegadur gouzañvat an arvrec'h).
- réflexe de préhension** ◇ **grasping reflex** ◇ **damoug gavaelañ pe erwez g. gavaelgar** (sl. *grasping reflex*).
- réflexe presseur** ◇ **pressor reflex** ◇ **damoug usreer** An damoug usreer (Danielopolu) zo an anv roet d'un teskad damougoù anreol a loc'h eus ar galon hag eus an aortenn o tevoudañ gweredoù fraouatet war ar benvegad kalongwazhiedel : kalonustead, muiaat argrezusted ar c'haber kalon, muiaat gwask ar gwad ha marteze ivez strishaat an talmerennoù kuruner.
- réflexe proprioceptif** ◇ **proprioceptive reflex** ◇ **damoug anunfraouadel** Damoug eus ar rizh eeunañ, an organ fraouadus oc'h erwezhañ ouzh ur fraouatet o tont eus e diriad piaouel. An damoug-se ne engwez, moarvat, nemet div neuronenn, unan santout hag unan loc'hañ (gwareg damougel eeun). Skouer : argrezadur ur gigen devoudet dre zardhañ a-daol an kez kigen pe dre giziata ar stirenn anezhi.
- réflexe psycho-galvanique** ◇ **psychogalvanic reflex** ◇ **damoug psikogalvaniek** Argemm tredanharzded ar c'hroc'hen, dindan delanvadoù liesseurt, fromoù, fraouadoù skiantennel en araez da zargemmañ ar c'hwezparañ Féré, 1888).
- réflexe pupillaire** ◇ **pupillary reflex** ◇ **damoug ar mab lagad ouzh al luc'h** Mabargrezañ devoudet dre vannañ un hordenn luc'h ouzh al lagad (damoug ouzh al luc'h pe damoug luc'hloc'hadel) pe dre welout un ergorenn dost (damoug ouzh an argeidañ).
- réflexe pyélo-vésical** ◇ ◇ **damoug lestr-c'hwezhiell** Laur damougek devoudet a-wechoù gant ar glañvourion gwazhet gant al lestrfo, al lestrlounezhfo pe grouanegezh al lounezh, dre waskañ speur ar c'hof 2 pe 3 cm diouzh al linenn greizer. Devoudañ a reer evel-se ul laur o saezhenniñ etrezek ar c'hwezhiell, kevret gant ar c'hoant troazhañ.
- réflexe radiopronateur** ◇ **radiopronator reflex** ◇ **damoug lestr-c'hwezhiell** Damoug a-stirenn o naouiñ dre balvstouiñ an arvrec'h da heul kiziata talbenn araok-diavaez ar werzhid hag o klotañ gant ar c'hwec'hvet gwriazienn c'houzoug.
- réflexe rénorénal** ◇ **renorenal reflex** ◇ **damoug lounezh-lounezh** Loanost ha strafuilhoù arc'hwelel (antroazh), arsellet en tu bonan e degouezh lounezhad untu (grouanegezh).
- réflexe réno-urétéral** ◇ ◇ **damoug lounezh-sandroazh** Laur o saezhenniñ a-hed ar san droazh, anglevet e degouezh grouanegezh al lounezh.
- réflexe rénovésical** ◇ ◇ **damoug lounezh-c'hwezhiell** Anadennoù c'hwezhiell, evel dezioulañ arreat, tenndroazh, tangrez, arsellet a-wechoù e degouezh grouanegezh al lounezh.
- réflexe scrotal** ◇ **scrotal reflex** ◇ **damoug gousac'hel** Damoug blevloc'hadel an dartzog.
- réflexe sinu-carotidien** ◇ **carotid sinus reflex** ◇ **damoug god ar garotidenn** Gorregezh leiek ar pouzl gant izeladur ar gwask izek pa vez amwasket ar gouzoug e par forc'h an div garotidenn voutin ; anadenn reñverek e degouezh vagotoniezh, tuginet e degouezh usren simpatek.
- réflexe stylo-radial** ◇ **radial reflex** ◇ **damoug stilhon ar werzhid** Plegañ an arvrec'h delanket gant kiziata stilhon ar werzhid.
- réflexe tibiofémoral postérieur** ◇ **tibio-adductor reflex** ◇ **damoug skin-morzhed adreñv** Argrezañ ar c'higennoù nesaer delanket gant kiziata skodenn greizer al skin.
- réflexe total** ◇ **mass reflex** ◇ **damoug skin-morzhed adreñv** Erwez dam izelañ ar c'hof en he fezh e degouezhioù peurskejadur ar mel a-livenn. Broudadur an izili traoñ a zelank ar fiñv emdenn, karzhadur ar c'hwezhiell ha c'hwezadur an izili seizet.

réflexe trigémينو-palpébral ◇ **trigeminfoacial reflex** ◇ **damoug trigevell-malvenn** Serridigezh ar malvennoù delanket gant ur fraouadur douget e tiriad an nervenn drigevell. Skouer : damoug fri-malvenn, damoug Mac Carthy.

réflexe urétérovésical ◇ ◇ **damoug sandroazh-c’hwezhigell** Laur damougek kevredet gant ar c’hoant troazhañ a vez devoudet gant ar c’houziviaded wazhet gant al lestrfo pe al lestrlouezhfo, en ur erc’hwiliañ speur draoñ ar c’hwezhigell e live difourk ar sanioù troazh. An arouez peuzarstal-se a vez aesoc’h da stadañ gant ar venev, pa erc’hwilier dre an touch gouinel.

réflexe vélopalatin ◇ **palate reflex** ◇ **damoug ar ouel stavn** Argrezañ untu ar ouel stavn delanket dre douch skañv ar glaourgenn anezhi a-zehou pe a-gleiz d’al linenn greizer.

réflexe véscorénal spontané ◇ ◇ **damoug c’hwezhigell-lounezh emdarzh** Laur anglevet e par al lounezh wazhet pa vez gant ar gouzrec’h ar c’hoant troazhañ ; an damoug-se a c’hoarvez e-kerz al lestrlouezhfo evit gouziviaded ar forzhioù troazhañ.

réflexogène ◇ **reflexogenic** ◇ **damougalf g. & aa.** O tevoudañ un damoug. Gl. *zone* ~ : an damougalf zo un tachad eus ar bevedeg a zevoud ar broudard anezhañ un damoug.

réflexogramme achilléen (ou calcanéen) ◇ **Achilles’s reflex time** ◇ **damougwezad g. stirenn ar seul** Lerc’hwezañ kevregat ar respont kahevel ouzh kiziata stirenn ar seul. Ent reol e pad an argrezañ etre 250 ha 300 ms ; gant ar gouzrec’h skoed-isvorc’hek e vez gorrekoc’h, tra ma vez herrekoc’h gant ar gouzrec’h skoedusvorc’hek.

réflexométrie ◇ **reflexometry** ◇ **refleksometriezh b.** Termen o teanviñ ar c’heñverioù etre doareoù damougoù ’zo arsellet gant ar gouzrec’h bonan ha doareoù an kez damougoù daskemmet gant ar c’hleñved, ha n’eo ket ur muzulierezh dik anezho. Damoug ar mab lagad ouzh al luc’h a empleg studi an damoug luc’hloc’hadel hag an daskemmadou kleñvedel anezhañ (Enkelvezh hirbad, gorregezh hag ampled izel, pebeiladurioù isvoll hag usvoll, h.a.).

réflexothérapie ◇ **reflexotherapy** ◇ **damougurañ** Hentenn yac’haat o c’hoarvezout a zevoudañ damougoù dre vroudañ, dieraeziñ pe ezañ ur rannbarzh estreget an hini a zo tizhet, e sell da zec’han erwezhoù damougek azou.

reflux gastro-œsophagien (RGD) ◇ **œsophageal reflux** ◇ **gindrehent g. kreuz-treizher** Askennad en treizher un darn eus endalc’had trenk ar stomok, anadenn spanaennek ha diazon ent reol, o c’hoarvezout gant ar c’houziviaded holl, war-lerc’h ar predoù pergen. E degouezhoù ’zo evelkent, ur gindrehent o arreata pe o padout betek re a c’hell bezañ kiriek da azonou diaezus da c’hoarvezout (loskadurezhioù sezet a-dreñv ar glerenn, distreizhadou trenk) hag a-wechoù da rouestladdoù, oc’h azonañ ur g. k. kleñvedel.

reflux hépatojugulaire ◇ **hepatojugular reflux** ◇ **gindrehent g. avu-kerc’henn** Dardenn gwazhienn ar c’herc’henn dec’hanet dre amwaskañ gorrek ha hentennek an avu (pe ar c’hof) hag o padout keit hag an amwaskañ-se. An azoniad-se (a-ser gant ur c’hresk muiek eus gwask ar gwad e gwazhienn ar c’herc’henn), arsellet gant ar c’houziviaded tizhet gant ur skorted kalon, gant darwazhiadur an avu, a erzerc’ha ur skorted kofigel dehou.

reflux splénojugulaire ◇ ◇ **gindrehent g. felc’h-kerc’henn** Dardenn gwazhiennou ar c’herc’henn dec’hanet dre amwaskañ gant an dorn ur felc’h usventek (felc’husvent trovanel, da skouer). A-ser gantañ ez eus un uswask gwazhiennel oc’h azonañ un uswask porzhel dre uskas gwazhienn ar felc’h hag ur c’hehented rez etre ar reizhiadoù porzh ha kav.

refoulement ◇ **repression** ◇ **arvoustrañ** A) Er ster strizh : gwezhañ ma klask drezañ ar gouzrec’h argas hag arzerc’hel en diemouez derc’hadoù (dezevoù, skeudennoù, eñvorioù) stag ouzh ul luzad. C’hoarvezout a ra pa ve gwalc’hidigezh ul luzad — ha hi danvez bliz drezi he unan — en arvar da zevoudañ divluz e-keñver darvennoù all.

Anat eo gwered an arvoustrañ en darfell, hogen bras eo ivez ar roll c’hoariet gantañ er bredanaezioù all hag er vredelezh reol. Ober a c’haller anezhañ un argerzh bred hollveziadel e kement m’emañ en orin amparadur an diemouez evel domani disrann diouzh ar peb-all eus ar bred.

B) En ur ster dispisoc’h : a-wechoù e vez kemeret gant Freud an termen *Verdrängung* en ur ster nes da hini “difenn”, diouzh un tu e kement m’en em gav an arvoustrañ er ster A evel ul lankad da nebeutañ e-barzh argerzhioù difenn kemplezh (anvad ar parzh o talvezout evit an hollad), diouzh an tu all e kement ma arver Freud patrom arlakadel an arvoustrañ evel pimpatrom an difennoù all².

réfractaire : **période ou phase** ~ ◇ **refractory period** ◇ **lankad g. anvrouadel pe anvroudezh g.** padvezh war-lerc’h diouzhtu lankad gwerederezh un nervenn pe ur gignenn, ma chomo direspont ur fraouadenn eus an kez nervenn pe eus an kez kigenn. Peuranvroudadus ez int da gantañ (peuranvroudezh), ha goude isvroudadus (isanvroudezh).

réfraction ◇ **refraction** ◇ **gouskogañ** Kemm roud ul luc’hskin pa dremen eus ur metoù optikel d’unan all.

réfractive : **chirurgie** ~ ◇ **refractive surgery** ◇ **surjianerezh g. ar gouskogañ ; surjianerezh gouskogel** Surjianerezh amkanet da gemmañ gouskogañ ar voull lagad dre zaskemmañ stumm ar gornsaes. C’hoarvezout a ra eus ar c’hornaesbenañ (emprennek pe get), ar c’heratomileuziz, ar geratofakiezh ha nevesoc’h an epikeratoplastiezh.

réfringence ◇ **refrigency** ◇ **gouskoguster g.** Perzh hollek ar meteier optikel boull da zaskemmañ tizh al luc’h a dremen drezo ha dre se korn treledañ ur skin dehaezet. Keñver tizh ar gouloù er goullou ouzh an hini a zo er metoù zo *feuriader gouskogañ* ar metoù (sl. *biréfringence*).

Refsum ou Refsum-Thébault : **maladie de** ~ ◇ **Refsum’s disease** ◇ **kleñved g. Refsum** Kleñved hêrezhel dibaot treuzkaset er mod enkilek aotozomek, oc’h anadiñ er bugelvezh pe er c’hrennoadvezh. Naoñ a ra *ent klinikel* dre gevredet ul

²Arroud tennet eus : Guy ÉTIENNE, *Geriadur ar Bredelfennerezh*, Preder, 1983

liesnervennfo pellek gant kaheisteñ, un dic'henezhadur livegennek eus al luc'hsae gant bouc'hwel issked, un enkaat kengreiz a 'r gwelvaez, isteñ ar vegenn weledele, digevredañ albumin-kelligoù al liñvenn benn-kein hag un ankedre ilpennel gant strafuilhoù an eraeziñ endonel; a-wechoù e kaver ouzhpenn un isklev, un dalpennviwe, un iktioz hag ur c'halongaherad. Gorrek ha direoleiek eo an dedro. Un anaf neuziadurel pennañ zo un nervennfo usteñvel. Emañ ar c'hleñved a-zalc'h gant un direizh eus kennevid al lipid a orin peroksizomel : miec'haoz ar fitol hag an drenkenn fitanek gant ar yoc'hadur anezhi er gwad. Bez' ez eo ul lipoidoz (sl. *lipoidose; neuropathie métabolique*).

Refsum : syndrome de ~ ◇ **Refsum's disease** ◇ **azoniad g. Refsum** Nervanaez nes kenan da gleñved Refsum, hep bezañ kevredet gant muiadur ar wadfitanegezh avat.

refus : phénomène tissulaire de ~ ◇ ◇ **anadenn b. c'hourzherc'hel ar gwiadoù** Erwezh kelligel gwiadoù ar bevedeg a zeu da vezañ harzuz ouzh gwered garvevion pe viruzoù 'zo. Bez' ez eo un argerzh hangae gwiadell.

régénération ◇ **regeneration** ◇ **adc'henezhañ** Adluniadur ur parzh distrujet.

régime ◇ **diet** ◇ **reol b. voued; hanren g. (~ emvevañ, ~ emvagañ)** Hervez ar c'herienn, doare emvagañ pe emvevañ desoliet ha hentennek (sl. *diète*).

registre ◇ **register** ◇ **marilh g.** 1 ~ *klañvadur*. Marilhadr kendalc'hek ha dizilerc'h degouezhioù nevez un naoued roet, arsellet en ur rannbarzh douaregorel savelet. Kevaraeziñ a ra gwellaat an anaoudegezhioù a-zivout an kez klañvadur. 2 Marilhoù zo ivez evit a sell prederiadurioù lael pe get.

règles : fausses ~ de la quinzaine ◇ **menses** ◇ **gaouizioù l. ar pemzektez** Krozhwadiñv leiek o tarvezout a-wechoù 15 deiz war-lerc'h dibenn ar mizioù, en ampoent ar vic'hadñ.

règle des sept jours ◇ ◇ **reolenn b. ar seizh deiz** Berzidigezh da sevel pe da erouint un ordrenañs oc'h erskrivañ baderioù evit ur prantad brasoc'h eget seizh deiz. Distrihaet eo bet ar reolenn-se e 1999, da skouer eo bet astennet an termen betek ugent-eizh deiz evit al liaoù euvret dre ar genoù ha morfîn enno.

règne ◇ **kingdom** ◇ **riezad b.** Eil derez rummañ ar bevion e rummadoù, an hini kentañ o vezañ an *domani*. Menegomp ar *r. loenel*, ar *r. plantel*. Aozerion 'zo a ouzhpenn *r. ar protisted* (sl. *domaine, protiste*).

regorgement ◇ **overflow** ◇ **gourberañ** Anv a reer eus *troazhodiñ dre c'hourberañ* evit diver an troazh diouzh ur c'hwelzhigell usvollek nad eo mui evit argrezañ (sl. *miction*).

régression ◇ **regression** ◇ **argizañ** 1 Distro ur gwiad pe un organ d'ul lankad kent eus an dedro anezhañ. 2 (Bredoniezh) distro d'ur bazenn gent eus an diorreadur kantaazel pe gefredel.

régulation ◇ **regulation** ◇ **arouleviañ** 1 Barregezh gant ur c'hellid, e deroù e ziorreadur, da furniñ un pe lies bevedeg klok ha hedrevn, goude ma 'z eo bet muturniet (an diwan eus gevellend unviel zo disoc'h d'un arouleviañ). 2 Dre astenn ster : furmidigezh un organ klok diwar an eginenn anezhañ bet muturniet. 3 Hollad an erwezhioù bevedel a-berzh ur gellig, ur gwiad, ur bevedeg pe ur reizhiad a denn da herzel ouzh heuliadoù an daskemmoù trumm o c'hoarvezout er metoù bevañ. Emañ an arouleviañ ampleget gant emazasausted ar bevedegoù.

régulon ◇ **regulon** ◇ **regulon g.** Stroll gen luniañ ha reoliñ a-strew war gromozom ur vakterienn hag o tasperzhiañ en aroulevierezh an anialegezh anezhi.

regurgitation ◇ **regurgitation** ◇ **1 distreizhañ 2 gousilhañ** 1 (Kreuzpervezouriezh) Distro ar bouedoù eus ar stomok pe eus an treizher er genoù, hep striv c'hweliñ ebet; seurt gwezh, keñveriet ouzh an daskiriañ, a c'hoarvez alies gant ar vugale yaouank. Kavet e vez ivez e strishadurioù an treizher hag en un niver bennak a anezioù stomok. 2 (Kalonouriezh) *G. kentezel, mintrel* pe *sistolel*. Strink gwad eus ar c'hofig kleiz er c'hentez kleiz e-doug ar sistol kofigel dre un igorenn vintrek andalc'hiat. Ar c'hofigluniñ kleiz, e-kerz ar gwazhiedkalonfiñvuniñ, hag ivez an dopler poulzata, a c'hell dinoiñ ha, betek ur poent, kementañ ar skorted vintrek-se.

régurgitation : fraction de ~ ◇ **regurgitation fraction** ◇ **rann c'housilh** Lodenn ec'honad ar gwad diflistret da-geñver ar sistol kofigel nad eo ket kaset war-du an trobarzh, met a zistro etrezek an argrec'h, en arbenn eus ezreolderioù korfadurel, da skouer : eus ar c'hofig kleiz er c'hentez kleiz, er skorted vintrek; eus ar c'hofig kleiz er c'hofig dehou dre ur c'hehented etre-kofigoù hag ivez eus an aortenn er c'hofig kleiz e degouezh a skorted aortek.

réhabilitation ◇ **rehabilitation** ◇ **azgouestaat** (sl. *réadaptation*).

Rehn : signe de ~ ◇ ◇ **arouez b. Rehn** Koeñv merzhet ouzh an teuta eus ar rannbarzh us-klerenn, oc'h anadiñ e-doug an ec'hanañ hag amparet gant an toazon usventek oc'h ogañ er-maez eus ar bruska.

réhydratation ◇ **rehydratation** ◇ **douradvec'hiañ** Enteñ yac'hadel dour en ur bevedeg a vank.

Reichert : syndrome de ~ ◇ **Reichert's syndrome** ◇ **azoniad g. Reichert** Nervost an taboulin, eus barr kengostezel an nervenn deod-gargadenn. Erzerc'hañ a ra dre laurioù grezvarrek luc'hedek lec'hiet en ode diavaez ar c'hleved.

Reifenstein : syndrome de ~ ◇ **Reifenstein's syndrome** ◇ **azoniad g. Reifstein** Azoniad leteñvel ouzh gaouazoniad Klinefelter, hogen dezhañ un doareenn familhel ma 'z eo arstalek ar vevvronnegezh hag an hipospadias.

Reilly : phénomène ou syndrome de ~ ◇ **Reilly's phenomenon** ◇ **anadenn b. Reilly, azoniad g. Reilly** teskad ar strafuilhoù devoudet ent amodel, e par lies organ, dre un hegadur eus ar reizhiad simpatek kreiz pe trobarzh (pe, zoken, eus ur glourgenn paot ennañ ar gwiennoù santout, evel hini ar c'hargadenn). Dec'honet e c'hell bezañ an hegadur-se gant gwezharioù

liesseurt kenan (toksinoù garvel, gwezhierioù fizikel, erwezhioù allergik, h.a.); skignañ a ra betek an organoù pellañ ha devoudañ enno ur gwazhiedfrankaat gant heforshaat ar c'horrwazhied, ur gouliñv, angwazhiadoù hag ivez anafoù o tizhout a-ziuz ar reizhiad retikuloendotelel. Kement-se holl zo da dostaat ouzh an azoniad yud arsellet ent klinikel.

rein ♦ **kidney** ♦ **louezh** b. Organ daoudañvat loet e kavenn ar c'hof a-ziadreñv an ampeleñ ha dezhañ da arc'hwel pennañ borc'hadur an troazh.

rein : **nécrose papillaire du** ~ ♦ **renal papillary necrosis** ♦ **marvennadur g. begennoù al louezh** Heñvelster gant *marvennadur ar vezonenn louezh* (Gl. *nécrose médullaire rénale*). Marvenn heskwadel kantet e pikernenoù al louezh hag alies er begennoù, a-gevaraez da boreadur al louezh, da vezañs un diabet, d'ur skoilh war ar forzhioù troazhañ pe da euvridigezh hirbad fenaketin. Enkelat ent klinikel e vez pe erzerc'hañ a ra dre droazhwadegezhioù digevret, dre ur skorted louezh damantroazh, pe c'hoazh dre un daolenn lestrlouezhfo lemm pe c'houlemm. An troazhluniñ a laka war wel skeudennoù kavennek, e stumm gwalennoù pe paviou krank.

rein artificiel ♦ **artificial kidney** ♦ **louezh kalvezadel** Ardinvik dedalvezet evit ar c'harzhañ ezlouezel dre hemodializ skoevredat. Ar gwad amdreuet er-maez eus ar bevedeg a dremen en un duellenn pe e plakennoù kellofan soubet en un dileizhad kengrennek NaCl, ma fu an dilerc'hiadoù pistriek, hag, evit klozañ an amred, a zistro en ur wazhienn.

rein de choc ♦ **crush kidney, shock kidney** ♦ **louezhad g. bleuz** Skorted louezh lemm heskwadien diwar koemp trumm ar gwask talmerel, dezhi lies arbenn : bleuz gwadliñvien, daraez, azoniad ar flastr, gwezh surjaniel, bleuz pistriboreel, h.a. (sl. *Bywaters* : *syndrome de* ~, *syndrome d'écrasement*).

rein en éponge ♦ **sponge kidney** ♦ **louezh spouevanek** Anvet ivez *kleñved Cacchi ha Ricci*, usvoll kistek ganedigel eus ar pibelloù dastum, sezet e pikernenoù al louezh, en ervez da rouestlañ dre ur c'hrouanegezh a 'l louezh.

rein en fer à cheval ♦ **horse shoe kidney** ♦ **louezh houarnmarc'hek** kammneuziad e stumm un houarn marc'h oc'h eren blein traoñ an div louezh gant gwriad stirek pe parenkimatus, loet a-ziaraok ar gwazhied bras.

rein flottant, rein mobile ♦ **wandering kidney** ♦ **louezh eskantet, louezh heloc'h** (sl. *néphroptose*).

Reinhardt et Pfeiffer : **syndrome de** ~ ♦ **Reinhardt-Pfeiffer syndrome** ♦ **azoniad g. Reinhardt ha Pfeiffer** Seurtad dibaot a gorred vezomelek treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, naouus dre argrommed an arvec'h gant ished an helmo hag ar spilhenn.

rein mastic ♦ **mastic kidney** ♦ **louezh vastik** Seurtad torzhellegezh louezh ma 'z eo treuzfurmet an organ a-bezh en un dolzenn geuzennek, toazek, heñvel ouzh mastik ar werennerion.

réinfection ♦ **reinfection** ♦ **adporeañ** Poreadur nevez o tarvezout war ur goudrevn poreet a-gent gant an un hadenn, hogen pareet bremañ diouzh ar poreadur kozh-se.

reins : **nécrose corticale bilatérale des** ~ ♦ **renal cortical necrosis** ♦ **marvennad g. daoudu pluskenn al louezh-i** Marvennad heskwadien hollad an elfennoù kelligel eus pluskenn al louezh (bloueigoù, epitelienn ar pibelloù nezek pergen, talmerennigoù). Darvezout a ra ar peurliesañ da heul darvoudoù amiegel (gwatoñv drektorzhienn), dibaotoc'h e-doug ur poreadur, ur pistriadur, un daraez, ur bleuz, un dourisvec'h muiek. Deraouiñ a ra dre un damantroazh trumm e raokadur alies, gant ur c'hoempad hag a-wechoù gant ur gwadloezañ rust. Grevus kenan eo an dedro emdarzh, marvus afo en un daolenn antroazh dieiltro pe daoust da adkrog an troazhvorc'h; a-wechoù, neoazh, e teu ar pare, gant ur skorted louezh dilerc'hiat bras avat.

réinsertion ♦ **reintegration** ♦ **adkenemprañ** Teskad an diarbennoù kemeret da skoazellañ ur gouziviad da gavout e blas en-dro er gedvuhez (a. kevredigezhel) prevez ha foran hag er metoù micherel (a. *michere*l).

Reis-Bücklers : **maladie de** ~ ♦ **Reis-Bücklers disease** ♦ **kleñved g. Reis-Bücklers** pe **mideñv g. ar gornsae Reis-Bücklers** Mideñv hêrezhel ar gornsae, treuzkaset er mod trec'hek aotozomek, naouus dre zemerenoù fin stallet direoliek e stumm ur walenn war lavnenn vevennus araok ar gornsae. An astenn argreskus anezho a zevoud gouliezoù laurus ha leiadur ar gweled.

rejet de greffe : **phénomène de** ~ ♦ **graft rejection** ♦ **anadenn b. distaal an imboud** Argerzh hangaele a zo e devoud erwezhioù difenn bevedeg ur roadour ouzh un imboudenn pe un organ pe ur gwriad treuzplantet unspesadien, eleze o tont eus un hinienn a unspesad hogen a c'henezh antigenel kevarall. E seurt erwez "ostiz ouzh imboudenn" ez eo antigenoù gwiaadel an imboudenn (re ar reizhiad HLA pergen) a vez naouaet evel estren gant kelligoù hangae'hougonek an ostiz : limfokit T pergen hag ivez limfokit B. Ar re gentañ, dre gelligpistriañ (roll pouezusañ an erwezhioù hangae kelligel) hag an eil re, dre o antikorfoù (antikorfoù imboud), a zispenn an imboudenn. An kez dispenn, oc'h erzerc'hañ da gentañ dre ul leiadur eus perzh arc'hwelel an imboudenn, a zarvez ar peurliesañ e-doug an div sizhunvezh da heul an imboudañ, a-wechoù diwezhatoc'h, ha zoken gwezh a vez muioe'h eget 2 vloaz goude. Seurt barrad distaal a vez en araez da argizañ dindan delanvad ar mezegadur hangaeastaliñ pe da drebadañ (sl. *histocompatibilité, antigènes tissulaires, système HLA, hypersensibilité différée ou retardée, lymphocytes K*).

relargage ♦ **salting out** ♦ **disc'hoalat** Dispartiañ ur bevgediad eus un dourzileizhenn dre azdodiñ un hal meinel enni.

NOTENN : Termenet eo an anadenn evel leiaat dileizhadusted un hal pa azdoder un hal all d'an dileizhenn anezhañ. O vezañ ma c'hoari an anadenn ken e par an dileizhenoù, ken e par an arluggenoù, e ranker loc'hañ diwar ar c'heal keverdal d'an daou zegouezh, an arc'hoalenn. Digreskiñ a ra an arc'hoalusted, pe dislec'hiet e vez an danvezenn en arc'hoal gant unan all — alese ar c'hinnig *disc'hoal-*.

relaxation ◇ **relaxation** ◇ **1 delaoskiñ 2 delaoskiñ, arlaoskiñ 3 darlaoskiñ, istantañ 4 arhezañ** 1 Distenn korfel ha bredel. 2 Laoskaat, andiarvenn alies, tant ur gigenn, ur gaherwienn — *arlauskiñ ar c'hofigoù* (Gl. *relaxation des ventricules*), lankad ar c'hor kofigel o kregiñ gant renn ar gwask kofigel e-kerz an *diflistr* ha goude o kenderc'hel (etre serridigezh an trapigoù kornloarek ha digoridigezh an trapigoù kentez-kofig) gant an *arlauskiñ keitvenn*, heuliet gant *leuniadur herrek ar c'hofigoù*. An daou lankad-se zo parzhioù eus an *diastol*, a gendalc'h gant lankad leuniadur gorrek ar c'hofigoù hag a echu gant ar *sistol kentez*. 3 Leiaat tant ur gigenn war-bouez gwezhierioù 4 Distro ur reizhiad d'ar c'hempouez war-lerc'h ur strafuilh, un argrid o tont eus an diavaez. Kement-se a bad e-doug un amzer bennak, an *arhezvezh*. Er *skeudennerezh dre zasson gwarellel derc'hanel* (SDG) e lakaer kemm etre daou lankad evit arhezadur ar proton, T1 ha T2, arventennoù gwiadell anezho. **T1** pe *arhezvezh spin-rouedad* (pe *arhezvezh diahed*) a zewerzh adkemeridigezh gremm ar proton argridet gant an endro gwiadell (ar "rouedad"). **T2** pe *arhezvezh spin-spin* (pe *arhezvezh diadrez*) a zewerzh an etrewered etre proton argridet kefin. Hervez an natur anezho, ar gwiadell (da skouer : paoted an dour pe an druz enno) a roy un isarhent (du) pe un usarhent (gwenn) a vez unrezh pe allrezh hervez daspouezadur ar skeudenn e T1 pe T2, ar modoù SDG-se o kevaraezañ hennaderezh anafoù diseurt hervez teir flaenenn an egor.

relaxine ◇ **relaxing** ◇ **relaksin g.** Hormon liespeptidek bore'het gant ar c'horf melen bec'hiegel a zo e wered distenn juntad ar c'haezour ha heudañ argrezoù ar grozh.

release ou release reaction ◇ **release reaction** ◇ **erwez g. dilaoskiñ** Lankad ar gwadkaeañ kentael ma vorc'h buan ar pladanoù, daskemmet gant o glenadur ouzh speurioù ar gwazhied, un niver bennak a zanvezenoù (ADP, ATP, serotonin, katekolamin, K⁺, Ca⁺⁺, parenn bladanel 4) kevaraezus d'ar c'haouledañ. Gwezhusaet eo ar vorc'hidigezh-se gant bezañs louc'hadoù trombin. Diaraogiñ a ra an erwez dilaoskiñ ar pladandazañ.

rèlevement paradoxal de la paupière : **signe du ~** ◇ **Dutemps and Cestan sign** ◇ **aruez g. Dutemps ha Cestan pe aruez gorren diac'hinek ar valvenn** uheladur diac'hinek ar valvenn en tu seizet pa vez goulennet ouzh ar gouziviad, e seizi hollel an dremm, da c'houzizañ e sell ha goude da serriñ kreñv e zaoulagad.

REM ◇ **Rapid Eye Mouvement** ◇ **fiñv g. herrek al lagad, FHL** fiñvoù lagad herrek, naouus d'unan eus lankadoù an hun.

rem ◇ **rem (Rad Equivalent Man)** ◇ **rem g.** Doenad skinad ionaus luget a zo ar gwerc'h bevedel anezhañ par da hini ur rad skinadoù X.

Remak : **muscles du groupe ~** ◇ **kigennoù ar stroll Remak** Kigennoù nervaouet gant an nervenn a-werzhid, ar gigenn vrec'h-werzhid lakaet er-maez : kigenn drifennek ar vrec'h, ar c'higennoù a-werzhid, kigenn astenner a-helmo an arzorn, kigennoù astenner ar bizied, kigenn bellaer hir ar meud.

Remak : **réaction de ~** ◇ **erwez g. Remak** Anvet ivez *gorregezh ar stroñsad kaherel* : argrezad gorrek ar gigenn dindan wered ar red galvaniek, arsallet hepken war ur gigenn dic'henezhet he nervenn.

Remak : **syndrome de ~** ◇ **Remak's paralysis** ◇ **azoniad g. Remak** Anvet ivez *seizi gwrienziell krenn plezhad ar vrec'h* (Gl. *paralysis radicaire moyenne du plexus brachial*) : seizi devoudet gant tizhadur ar c'hef krenn (7vet gwrienni c'houzoug). Naouiñ a ra dre ur gouzeizi eus ar gigenn drifennek hag ur seizi gwak eus kigennoù all ar stroll Remak, gant steuz damoug ar gigenn drifennek, isteñv kaherel, strafuilhoù an erwezhoù tredanel hag a-wechoù un iseraez riblennek e-kreiz talbenn kein an arvrec'h hag an dorn.

Remak-Virchow : **loi de ~** ◇ **Virchow's law** ◇ **savelenn b. Remak-Virchow** Kelligoù hanweek ur yoc'henn roet a zeu dre ac'hadur rageeun eus kelligoù rakvezant.

remaniement chromosomique ◇ **chromosomal rearrangement** ◇ **azluniadur g. kromozomel** Termen genadel o teanviñ daskemmadoù luniadur diseurt, evel an treuzloañ, an dileiñ hag ar ginrannañ kromozomel.

remède ◇ **remedy** ◇ **remed g. -où** Mezegadoù, liael ar peurliesañ.

Remington : **test de ~** ◇ **Remington's test** ◇ **prouad g. Remington** Araezad deznaouiñ gwadvezel an toksoplasmoz. An antikorfou IgM dinodet e gwadveiz ar c'hlañvour zo lakaet war wel diwar-bouez hentenn an hangaegendreluc'hañ.

rémission ◇ **remission** ◇ **didorr g. -où** Distav padennek azonoù ur c'hleñved, pe lemm, pe henek. Padenn an didorr a vez graet didorrvezh anezhi.

rémittent, ente ◇ **remittent** ◇ **didorrennek aa.** Gant didorroù. Da skouer : *terzhienn d.*, terzhienn o tedreiñ e rezh un heuliad barradoù nesadek kenan. Ne zistro ket ar gwrezverk d'ar stad reol etrezo, ar grommenn anezhañ o tiskouez hepken un didorr anat pe anatoc'h.

remnologue ◇ **NMR spectrometer** ◇ **gwarellewerer g. -ioù** Ardivink oc'h averañ an dason gwarellel derc'hanel.

remodelage ◇ **remodeling** ◇ **azneuziñ** Daskemmañ an neuz. — *azneuziñ ar c'hofig kleiz*, daralladur kefluniad mentoniell ar c'hofig kleiz e dianlen un angwazhiad eus ar c'haher kalon, o tisoc'h war ur miarc'hwel daouel sistolel ha diastolel. — *azneuziñ askornel*, aznevezadur trovezhiek an danvezenn askornel e dianlen gwerederezh trebadek ha bevedel an osteoplast hag an osteoklast.

remplacement ◇ **substitution** ◇ **erlec'hiañ** Gwariadenn eus emrannañ ar c'helligoù o c'hoarvezout eus un eskemm hanrannoù etre daou gromozom.

Renander : **maladie de ~** ◇ **Renander's disease** ◇ **kleñved g. Renander** Marvenn askorn sezamek diabarzh ar meud troad. Erzerc'hañ a ra dre ul laur sezet dindan penn askorn kentañ ar c'hreiztroad.

renaturation ◇ ◇ **daznaturañ** Gwezh gin an dinaturañ, o taskor o ferzhioù orin d'ar proteinoù arwerc'het evel-se.

rénaux : points ~ ◇ ◇ **poentoù lounezh** Poentoù ma tevoud ar pouezañ ul laur e lounezhadoù 'zo (grouanegezh, lestrloun-ezhfo).

rénine ◇ **renin** ◇ **renin g.** Danvezenn uswaskeiat douhennet eus kaenenn lounezh ar c'honikl gant Tigerstedt ha Bergmann e 1898. Un α -globulin eo ar renin, borc'het gant benvegad nes-bloueig al lounezh, dezhañ ur perzh enzym (un aspartil-proteaz — ur proteaz aspartek — eo). Kediañ a ra ouzh un α_2 globulin eus ar plasma a orin avuel, an angiotensinogen (pe hipertensinogen, pe dindand plasmatek ar renin), da reiñ an angiotensin, anezhi an danvezenn uswaskeiat gwirion [sl. *angiotensine, prorétrine* ha *rénine-angiotensine (système)*].

rénine : activité ~ du plasma (ARP) ◇ **plasma renin activity** ◇ **perzh g. ar renin er plasma** Muzuliañ borc'hidigezh ar renin gant al lounezh diwar-bouez dezventadurioù skinhangael ha dewerzhet e kementad angiotensin dilaosket dre litr plasma ha dre vunud. Ar gwerzhadoù reol a vez 1, 1 ± 0 , 8 ng/mL/h pe 0, 9 nmol/L/h, evit ur gouzrec'h gourvezet abaoe 10 eurvezh ha diret d'un hanren sall reol. Uhel e vezont en uswask yud hag en uswask dre heskwal al lounezh, hag izel kenan en azoniad Conn.

rénine-angiotensine ou rénine-angiotensine-aldostérone : système ~ ◇ **renin-angiotensin** ◇ **reizhiad b. renin-angiotensin** Trevnad uswaskeiat bonan amparet gant ar renin hag an deverad anezhañ, an angiotensin. Ar gwered war ar gwask talmerel zo devoudet gant gwazhiedstrishadur an talmerennigoù ha gant kentraouadur borc'herezh an aldosteron a leia ezvevnenadur an dour hag an natriom. Er gleñvedouriezh ez eo kentraouet ar reizhiad renin-angiotensin gant heswad al lounezh [sl. *rénine, angiotensine, kallicréine-kinine (système)*].

réninémie ◇ ◇ **gwadvec'h g. renin, reninwadvec'h** Feur renin er gwad.

rénitence ◇ **renitency** ◇ **arwvended b.** Perzh un organ pe ur yoc'henn o herzel ouzh gwask ar bizied en ur chom dastennek ha hep ma santfed bezañ un hogennad liñvel. An daou geal "harzus" ha "dastennek" a gaver dec'heriet gant Br. *gwevn* — a arverer alies evel ur c'henster da "dastennek", hep derc'hel kont eus ar c'heal all "o herzel ouzh an distummañ".

rénoprive ◇ **renoprival** ◇ **ollounezhel aa.** A-zave da ezvenidigezh unan pe an div lounezh.

rénotrope ◇ **renotrophic** ◇ **lounezhwezher aa.** A-zivout un danvezenn o werediñ war al lounezh.

renouvellement ◇ **turnover** ◇ **azneveziñ** En un teskad, erlec'hiañ ouzh an elfennoù oc'h ec'hankañ elfennoù all oc'h enankañ : dre amsaviñ, treuzfurmiñ, dispenn hag enaozañ. E se en em ampar un amred, ur c'hor kennevidel, o kevaraezañ da zanvezennou an kez teskad trebadout ent kementadel hag ent doareadel.

rénovasculaire ◇ **renovasculer** ◇ **lounezhwazhiedel aa.** A-zivout gwazhied al lounezh.

renutrition inappropriée : syndrome de ~ ◇ **inappropriate refeeding syndrome** ◇ **azoniad g. an azvezhur ankev-azas** Dianlenad mezegadur ankevazas an disvezhureion henek grevus (hangasidi, disnaoneion). Kevrediñ a ra dreist holl skorted kalon ha lounezh, direizhoù nerval, fosforwadisvec'h, kaliomwadisvec'h, glukozwadisvec'h ha negezioù vitaminou.

renversé ◇ **reversed bandage** ◇ **anroañ tuginet** Embreg amkanet da araezañ peurloadur ur vandenn anroañ a buner en dro d'ur c'horreenn grenngemennek. Dre weañ an anro e teuer a-benn d'e blegañ warnañ e unan a-veskell, e doare ma teufe an tal diavaec dindan, ar vevenn izelañ o tont da vezañ an hini uhelañ hag evel-se ma kendalc'hfe ar punadur war an hevelep tu, gant un durc'hadur daskemmet un disterañ.

Reoviridae, Réoviridés ◇ **Reoviridae** ◇ **Reovirideged l. (g.)** Kerentiad viruzoù gant RNA daouarrevell, en o zouez ar genadoù *Reovirus*, *Orbivirus*, *Coltivirus* ha *Rotavirus*.

Reovirus ◇ **Reovirus** ◇ **Reovirus** Gwreskanv diwar Sz. *respiratory enteric orphan virus*, heñvelster *Orthoreovirus*, *viruz ECHO 10*, genad viruzoù enterek hag annalad gant RNA, eus kerentiad ar *Reovirideged*, goubaret diouzh stroll ar viruzoù ECHO; emañ ivez en araez da zevoudañ empennfoioù hag empennmelfoioù. Emañ treuzkiz ar reoviruz er gavael 75-80 nm ha dezhañ ur c'hapsid a gemparzhgezh diñsek, gant 92 gapsomer.

rep ◇ **rep** ◇ **rep g.** Tallzherennoù *Röntgen Equivalent Physical*, eleze kementad ar skinadoù ionaus o tec'han, dre c'hramm aer, an un niver a zaouadoù ion eus an div arouez hag an un gremm hag ur röntgen. Talvoudek eo an unanenn-se evit an holl skinadoù ionaus, lakaet e-barzh ar skinoù β hag an neutron.

répercussion ◇ **repercussion** ◇ **azlamm** Daskemm damougek al leiapad loc'hadel, e dianlen daraezioù pe argerzhioù kleñvedel o tizhout an hent santout.

répercussivité sympathique ◇ ◇ **azlammusted b. simpatek** Azlamm damougek anreol ur broudadur trobarzhel war ur rannbarzh pe un organ pellek dre hantererezh ar nervreizhiad simpatek. Dianlen eo da hegeuzded reñverek ar c'hreizzennoù, an nervreerioù pe an nervvuzerioù, pe c'hoazh da hini ar rannbarzh oc'h erwezhañ. Da skouer : an damoug blevloc'hadel a anad buanoc'h ha kreñvoc'h war un ezel daraezet pe c'hloazet.

reperfusion myocardique : syndrome de ~ ◇ **myocardial reperfusion syndrom** ◇ **azoniad g. an azerfenn kalon-gaherel** Teskad arouezioù oc'h erzerc'haat, e pazenn lemmded angwazhiad ar c'haer kalon, an assanellañ kurunerel (gounezet dre gaouledloezañ pe dre wazhiedatelviñ) : distav ar c'hevenkez kalon, argizañ dreistuheladur eus an arroud ST, usvrouadusted kofigel (o vont eus an dreistsistolegezh d'ar c'halonustead, o tremen dre ar gorvez hangofigel buanaet), renn abred ha digresk herrek usvec'h an enzimoù.

réplication ◇ **replication** ◇ **azeilañ, dasparañ** Lavaret e vez *dasparañ azeiladoù* — kevatal da *azeilañ* —, eleze amparañ un arrevell RNA kannad (*mRNA*) dre furmiñ un azeilad unrezh d'unan eus an arrevelloù DNA. — En un doare hollekoc'h, amparadur — dre genstok — un azeilad eus un elfenn hielel.

replicon ◇ **replicon** ◇ **replikon** g. -où Berrañ tammad DNA pe RNA en araez da zasparañ.

repliement spectral ◇ **aliasing** ◇ **eilplegañ skalfadel** Anadenn o c'hoarvezout e-doug lerc'hwezadur an dopler poulzata pa vez an tizh muzuliet brasoc'h eget ur werzhad bennak (a zo ur gevreizhenn d'an talm ec'hodiñ), o verzañ muzulierezh herrou uhel (a se deur en degouezh-se eus an dopler a-gendalc'h).

repolarisation ◇ **repolarization** ◇ **advleinekaat** Adc'hounit tredanvec'hiadoù muiel. Advleinekadur gorre ar gaherwienn a c'hoarvez e mare didenn ar broudadur; war ar c'halonvarrwezed e klot ouzh ar wagnenn T. — **direizhoù an advleinekaat kalon-varrwezed** zo pe *kentael* (hep bezañ diaraoget gant daralladurioù ar gemplezh QRS), pe *eilvedel* en degouezh kontrol.

repos-

- *jambes sans repos* divesker dihabask • *douleur calmée par le repos* laur distanet gant ar paouez • *maison de repos* ti diskuizh
- *reposant sur une basale* o c'holeiñ un diazkenenn • *reposant sur une basale* o c'hourvez war un diazkenenn • *reposant en saillie sur* o valirañ diwar • *reposant sur une fine basale* gousolet war un diazkenenn voan • *la membrane basale où reposent les cellules épithéliales* an diazkenenn ma c'hourvez ar c'helligoù epitelel • *repos complet au lit ou au fauteuil* peurbouez war ar gwele pe er gador vrec'h • *retour au repos* distro d'an ehan.

répresseur ◇ **repressor** ◇ **goudaver** g. -ioù Protein danzeet gant ar gen reoliñ hag en araez da lenañ war un operon (e par an operator) ha da skoilhañ ouzh treuzskrivadur an RNA kannad hag ouzh enaoz ar proteinoù (sl. *opéron, opérateur, gène, inducteur, dépression*).

répression ◇ **repression** ◇ **goudaviñ** Heudañ ur c'henenn, o virout outi a erzerc'haat ar gwered anezhi.

reptilase ◇ **reptilase** ◇ **reptilaz** g. Enzim douhennet eus binim un naer a 'r genad *Bothrops* ha dezhañ ar perzh da dreuzfurmiñ ar fibrinogen e fibrin, en ur vezañ ankizidik ouzh gwered an heparin. — **an amzer reptilaz** Sz. *reptilase time* zo pad adrazeakaat ur plasma oksalatet e diraez reptilaz.

réseau ville-hôpital ◇ **network** ◇ **rouedad** g. **keoded-ospital** Trevnad a bareoù mezegel ha lezvezegel, a yec'hetioù, o kembodañ o c'hembelioù er par lec'hel pe ranndirel, en erdu rummadoù 'zo a glañvourion tizhet gant anaezioù grevus ha henek.

résection ◇ **resection** ◇ **dazbidañ** Dilemel war un hed bras pe vrasoc'h, un nervenn, ur wazhiedenn, ur gigenn, ur stirenn, un askorn, bonan pe glañv. — **dazbidañ ur c'henvell** (Gl. *résection articulaire*): troc'hañ kuit pennoù an eskern a ya d'e ober evit e lakaat da dramaotañ.

réserpine ◇ **reserpin** ◇ **rezerpin** g. Alkaloid douhennet eus gwriazienn ar *Rauwolfia Serpentina*, plantenn dezhi perzhioù hezuz hag iswaskeiat. Leiaat a ra bec'h ar serotonin en nerveg kreiz. An arver anezhañ zo aet er-maez a voaz.

réserve alcaline (RA) ◇ **alkali reserve** ◇ **kadavad** g. **alkali** Dindan an anvad-se e lakaer ar c'hediadoù kimiek (bikarbonatoù ha kediadoù gwan all a 'r drenkenn garbonek : sl. *danvezennoù skurzer*) bezant er gwad hag en araez, dre zilaoskiñ hag ezvevennañ CO₂, da skoilhañ ouzh aloubidigezh ar bevedeg gant un drenkenn greñv. Er pleustr e vuzulier an alkaliegezh c'halloudel-se dre arglask bec'h ar bikarbonat er plasma, dewerzhed dre ar c'hementad CO₂ dilaoskadus gant un ec'honad plasma anavezet, dindan delanvad un drenkenn greñv. Ar peurliesañ e ro 100 ec'honenn wad 50-60 ec'honenn CO₂. Dewerzhed en ion bikarbonat, emañ ar c'hadavad alkali reol etre 25 ha 27 milikevatal dre litr plasma (mEq/L pe mmol.L⁻¹).

réserve coronaire ◇ **coronary (flow) reserve** ◇ **kadavad** g. **(al lanvad) kurunerel** Al lanvad gwad kurunerel kadav — berroc'h *kadavad kurunerel* — a jeder evel ar c'heñver etre al lanvad kurunerel uc'hek (e-kerz ar strivad) hag al lanvad kurunerel er paouez, goude ur gwazhiedfrankaat uc'hek, dre ensinklañ engwazhiennel evit an dipiridamol, pe enkurunerel evit ar papaverin. Ar muzulioù a vez graet diwar-bouez an herventerezh Doppler enkurunerel. Ar werzhad reol anezhañ zo par da 3, pe brasoc'h.

résine ◇ **resin** ◇ **rousin** g. Gom pegus o tiverañ eus goulioù gwez 'zo. Bez' ez eus ivez *rousinoù kevanaozel*, arveret evel rousinow eskemmer ion (*rousinoù ioneskemmer*), kaliom da skouer e degouezh ar gwadusvec'h kaliom, hag arveret ivez evel *colesteroldadisvec'hiereù* (Sz. *cholestyramine resin*).

résinoïdien : syndrome ~ ◇ **resinoid syndrome** ◇ **azoniad** g. **rezinoïdel** Anvet ivez *azoniad kreuz-pervez*, ur c'hreuzpervezfo garv anezhañ (oc'h erzerc'hañ dre un darc'hoal, c'hweladoù ha kofost), delanket a-gentrat gant toksinoù (rezinoïdoù, da skouer : keton, kinon, nes da bistriennoù an ipeka, an evor pe ar goulourdrenn ouez) bezant e lies foueenn. Azoniek e vez ar prederiadur anezhañ.

résistance ◇ **résistance** ◇ **1 herzel bn. harz- ; harz g., harzder g., harzded b., harzsted b. 2 harzded b. 3 harz g. 4 harzell b. -où** 1 sl. **-résist-**. 2 Ent resis *tredanharzded* (Gl. *résistance électrique*), mentenn o verkañ eneberezh ur reell ouzh tremen ar red tredan. 3 Ent resis *tredanharz*, mentad termenet evel rannad ar barr dre ar read ($R = UI^{-1}$), dewerzhed en omoù (Ω). 4 Parzh un amred tredan, dezhañ ar perzh herzel ouzh ar red tredan.

-résist-

- *substance résistant longtemps à la putréfaction* danvez o padout pell ouzh ar breinañ • *fibre élastique, résistante* gwienn das-tennek, gwevn • *résistant aux enzymes protéolytiques* harzuz ouzh an enzimoù proteolitek • *résistant aux rayons X* harzuz ouzh ar skinoù X • *mouvement complet contre résistance modérée* fiñvadenn glok ouzh un harzerezh amgreñv • *insulinorésistant* insulinharzuz • *cartilage dont la rigidité et la résistance* migorn a zo e reuter hag e wevned • *résistance des parois vasculaires*

harzusted speur ar gwazhied • *résistance aux antibiotiques* harzusted ouzh ar bevastalerioù • *résistance à la fatigue* harzusted ouzh ar skuizhnez • *diminution de la résistance osmotique* leiadur an harzder grennel

résistance bactérienne aux antibiotiques ◇ ◇ **harzusted ar bakteri ouzh ar bevastalerioù, bevastalharzusted bakteriel** Perzh ar bakteri da badout ouzh ar bevastalerioù, a c'hell bezañ enganet (pe naturel) pe arzeuat diwar hirziastok. En degouezh diwezhañ-se e tisoc'h eus daskemm trumm, a-zarvoud, un hanrann gromozom bakteriel (dargenañ). An dargened harzus diwanet evel-se a yelo war neriñ, tra ma steuzio ar bakteri kizidik ouzh ar bevastalerioù dindan wered ar mezegadur (diuzadur). Kel zo eus *harzusted kromozomel* : daskemmet eo ar vukenn a veze tizhet betek henn gant ar bevastaler. — Un eil doare harzusted, paotoc'h hiziv an deiz (70 % eus an degouezhioù), a vez graet *harzusted plasmidel* pe *harzusted treuzkasadus* (Ochiai hag Akika, 1960) anezhañ, pa vez treuzkaset eus ur bakteri d'unan all an harzusted ouzh ar bevastalerioù gant plasmidoù 'zo, *plamidoù an harzusted*. — Un trede gwikefre zo : leiadur hedreuzded ar bakteri ouzh ar bevastalerioù. (sl. *plasmide, facteur R*).

résistance des érythrocytes à la chaleur : test de ~ ◇ ◇ **prouad g. harzusted an eritrokiz ouzh ar wrez** Studi keverata ar gwadloezañ er gwrezverk ordinal hag e 37°C en tesaer. Evit ar c'houziviaded tizhet gant kleñved Marchiafava-Micheli ez eo ar gwadloezañ herrekoc'h er wrez : deraouiñ a ra hogos diouzhtu, tra ma ne grog evit ur gwad bonan, en amvezadoù heñvel, nemet etre ar 72vet hag an 90vet eur.

résistance globulaire : épreuve de la ~ ◇ ◇ **erythrocyte fragility test** ◇ **prouad g. harzusted an hemati** Prouad a gevaraez andalañ harzusted ar c'helligoù ruz ouzh an danvezzennoù gwadloezus. Dasparzhañ a reer ar gwad e korzennoù, enno dileizhennoù NaCl dezho bec'hioù war zigresk (eus 0, 90 g da 0, 30 g %). Notañ a reer an dileizhenn ma krog an hemoglobin da skignañ (gwadloez deroù pe izegenn, ent reol etre 0, 46 ha 0, 44) hag an hini ma emañ ar gwadloez en e glokañ (gwadloez uc'hek, ent reol 0, 34). Lavarout a reer ez eo *kresket* an harzusted, pa na grog ar gwadloez nemet goude an dileizhenn 0, 42 (ikterioù 'zo) ha *digresket* (bresketed ar c'helligoù ruz), pa zeraou a-raok an dileizhenn 0, 48 (ikter gwadloezadel).

résistance maximale ◇ **maximal resistance** ◇ **harzerezh g. uc'hek** Nerzh uc'hek enebadus ouzh an argrezañ kigennel. An harzerezh-se a c'hell bezañ *diasavel* : un argrezad hepken e-doug un eilenn; pe *dialuskel* : lies argrezad dewerc'het evit ur vuanded, un ampled hag ur gorvez roet.

résistance vasculaire ◇ ◇ **harzded b. a' r gwazhied** Nerzh oc'h enebañ ouzh diver lanv ar gwad er gwazhied. Jedet e vez diwar gwerzhadoù ar gwaskoù er gwazhied ha kas ar galon. Emañ harzded amred an talmerennoù trobarzh etre 1 000 ha 1 500 unanenn Wiggers; hini amred talmerel ar skevent (pe *harzded talmerel skeventel*) a sav da 350 unanenn evit an harzded skeventel hollet (evit an *amred bihan* pe *amred skeventel*) ha da 100 unanenn evit harzded skeventel an talmerennigoù (er gennad talmerennigel rakkorrwazhiedel). An unanenn Wood a glot ouzh un diforc'h gwask 1 mmHg evit ur c'has 1 mL/s ha kevatal eo da 80 unanenn Wiggers.

résolutif, ive ◇ **resolvent, repellent** ◇ **1 darlaoskus aa. 2 darlaosker g. 3 argizus aa., oc'h argizañ** 1 En araez da habaskaat an danijenn. 2 Lia darlaoskus. 3 O vont war steuziañ, o tistreiñ d'ar stad reol.

résolution ◇ **resolution** ◇ **1 darlaosk g. 2 argizañ** 1 Leiadur pe steuziadur an argrezadoù kaherel arsellet da geñver an dieraiziñ, ar seizioù darnel hag ar c'hleñvedoù grevus. 2 Dibenn un tanijennadur gant distro ar parzhioù klañv d'o stad vonan, hep linadur.

résonance ◇ **resonance** ◇ **dasseniñ bn. dasson-** Anadenn o c'hoarvezout dindan meur a arvez hag e lies domani eus ar fizik : sten, tredan, treloc'h, luc'h, derc'han (spin)... An deskrievadur anezhi zo henezh : ampladur eus ar "respon" pe eus heled froumoù ur reizhiad bennak (an *dassoner*), a-gevreizh gant talm an argrid hag a-zalc'h ouzh talm piaouel naouus d'ar reizhiad. C'hoarvezout a ra an dasson — en hanren antraoladel — evel-henn : pa vez talm *f* an argrider par da dalm piaouel *f*₀ an dassoner e kenglot ar skogoù devoudet gant an argrider ouzh luskelladoù piaouel an dassoner.

résonance magnétique nucléaire (RMN) ◇ **Nuclear Magnetic Resonance, NMR** ◇ **dasson g. gwarellec derc'h-anel** Hentenn fizikel o kevaraezañ studiañ luniadoù molekulel 'zo (Bloch ha Purcell, 1946). C'hoarvezout a ra a glask an talm a laka da zasseniñ derc'hanoù unrezh (proton, da skouer) bezant er molekul ha dezho ur gwarellankad. Ar rannigoù oc'h amparañ an derc'hanoù zo dezho ur spin — emaint o c'hweldreiñ — ha setu perak ez eus da bep hini anezho ul lankad gwarellec. Ma n'eo ket sammad an holl lankadoù par da vann ez eus neuze ur gwarellankad d'an derc'han ivez. En degouezh-se e c'haller armoññ an dasson gwarellec. Evit se e staler an danvezenn da zielfennañ en ur gwarellvaez arstalek kreñv. An derc'hanoù dezho ul lankad gwarellec a steud pe diouzh tu ar gwarellvaez, pe diouzh an tu gin. An kez gwarellvaez a savel enta div boblañs derc'hanoù. Lakaat an derc'hanoù da zasseniñ zo neuze kement hag o lakaat da dremen eus ur boblañs d'eben. Hag en amboaz-se emañ ret pourchas dezho ur c'hementad gremm savelet resis, pezh a sevener dere argridañ an danvez gant ur gwarellvaez ouzhpenn, pebeilat ar wechmañ, dezhañ un talm azas. Saveladur an talm-se n'eo deurus nemet pa 'z eo strafuilhet gant div anadenn a-zalc'h ouzh al luniadur molekulel :

1° Dilec'hiadurioù an douesterioù elektron en dro d'an derc'han ereet ouzh an endro kimiek (bezañs strolloù bleinek er molekul),
2° ar c'houbladurioù gant derc'hanoù unrezh nes (a ziforc'heka, da skouer, dasson ar proton e -CH₂ - hag e -CH₃).

Bezout ul lankad gwarellec derc'hanel n'eo ket ur perzh gant un elfenn gimiek (hidrogen, karbon, fosfor), hogen gant izotopoù 'zo anezho (¹H, ¹³C, ³⁵P). Dibaot eo an elfennoù-se, ha dibaotoc'h c'hoazh ar re a ro arhentoù kreñv (¹H pe proton, ¹⁹F). Ar re-se hepken a c'hell kaout dedalvezadurioù er vezekniezh (skeudennerzh dre zasson gwarellec). Evit ar re-se e kevreded dasson gwarellec derc'hanel proton an dour bezant er gwiadoù bev, gant ar c'hwilerviñ, an erluniñ hag ar c'heweriañ skeudennoù gant an

urzhiataer. An disoc'hoù gounezet, war an empenn pergen, a c'hell bezañ resisoc'h eget ar skeudennoù bet gant ar skinerluniñ. Hogen, e gin an hentenn diwezhañ-se, pourchas a ra an DGD ur skeudenn neuziadurel ha kimiek war un dro (sl. *imagerie médicale*).

résorption ◇ **resorption** ◇ **1 deloezañ 2 assugañ** 1 Steuziadur darnel pe hollet un organ pe un aozad kleñvedel, sonnel, liñvel pe aezhel, an elfennoù anezho o vezañ enamredet tamm ha tamm gant ar gwad pe al limf. 2 Tremen un danvezenn (ul lia da skouer) er gwiadoù hag en amred ar gwad, pe c'hoazh a-dreuz un epitelienn, ur glaourgenn (hini ar pervez, da skouer).

résor-

• *qui se résorbe rapidement après la naissance* assuget buan goude ar c'hanedigezh • *résorption ostéoclastique* deloezañ osteoklastek • *résorbé ensuite in situ par les macrophages* deloezet da c'houde war al lec'h gant ar makrofag • *dont la résorption est très lente* assuget e vez gorrek • *mégalo blastes dont le noyau s'est résorbé* megaloblast bet deloezet o c'hraoñell • *voies de résorption naturelle* forzhioù assugañ naturel • *fils non résorbables* neudennoù andeloez • *résorption osseuse* deloezañ an eskern • *les points où elle puisse être résorbée* ar poentoù ma ve assuget • *résorption du rebord alvéolaire* deloezañ ribl al logigoù • *processus de résorption osseuse* argerzh deloezañ an askorn..

respirateur ◇ **respirator** ◇ **adanaler g.** Ardivink o kevaraezañ gwenterezh skevent ur c'hlañvour gant aer pe oksigen, enc'hwezhet ar peurliesañ er vriant. Ardivinkoù emgefreak 'zo a zewerc'h un analerezh kalvezadel hirbad gant un talm, un ampled hag ur gwask reoliadus (sl. *poumon d'acier* ha *respiration artificielle*).

respiration ◇ **respiration, breathing** ◇ **analañ; analerezh g.** Hollad an anadennoù fizikel-kimiek amkanet da enankañ oksigen er bevedeg ha da ezvevennañ ar CO₂. C'hoarvezout a ra an analañ eus ar gwenterezh skeventel, eus dezougerezh (gant ar gwad) an aezhennoù engwezhet hag eus an eskemmoù kennevidel er c'helligoù.

respiration apneustique ◇ **apneustic respiration** ◇ **heudanalañ** Strafulh analadel o naouiñ dre un enanalañ hir heuliet gant ur baouezenn un nebeut eilennoù — diwar dargrezadur padek ar c'higennoù enanalañ — hag un ec'hanañ berr kenan, heuliet a-wechoù gant ur baouezenn all. Devoudet eo gant un anaf eus ar c'hil pont a-is da dal eskoriñ an nervenn drigevell, dec'hanez ar peurliesañ gant un tromboz eus talmerenn an diazpen.

respiration artificielle ◇ **artificial respiration** ◇ **deanalañ; analerezh g. kalvezadel, gwenterezh g. kalvezadel** Hollad an embregadoù — dreist holl enc'hwezhañ aer diwar-bouez hentenn ar genoù-ouzh-genoù pe dre araez binvioù oc'h amsaviñ ar c'hefloc'hadoù goulanket da gavenn ar bruska ha sachadennoù war an teod —, kaset da benn pe evit an nevezc'hanez e stad a varv hañvalat, pe e degouezh a ezwal pe a voug, e sell da enteñ aer er forzhioù briant-bronkez ha da assav arc'hwel bonan an analañ. Spizomp arver an termennoù : an *deanalañ* zo un hentenn *wenterezh kalvezadel*, termen a denn da vezañ erlec'hiet ouzh an hini a *analerezh kalvezadel*.

respiration assistée ◇ **assisted respiration** ◇ **analeilerezh g.** E-doug an dieraezñ hollek en amred kloz ha gant kurariñ, kresk ampled loc'hadoù analañ ar c'hlañvour diwar-bouez gwaskadennoù gwezhet gant an dieraezour war ar sac'h analañ, ent reoliek ha diouzh korvez piaouel ar gouzrec'h. An amkan zo kevaraezañ ur gwenterezh skeventel spirus.

respiration contrôlée ◇ **controlled respiration** ◇ **analerezh g. reolet** E-doug an dieraezñ hollek en amred kloz ha gant kurariñ, erlec'hiañ ouzh korvez analañ piaouel ar c'hlañvour, astalet gant gwered ar c'hurar, ur gorvez kalvezadel, arc'het gant an dieraezour ha dastroc'het gant paouezennoù, ret holl e gwezhiadennoù 'zo war ar c'hof ha war ar bruska, dreist holl. Ar c'halvezder analerezh kalvezadel-se, na lez d'ar c'hlañvour kentod analañ ebet, a vez arveret ivez da-geñver ar skortedoù analadel lemm. An adanaler eo a enc'hwez aer e skevent ur c'hlañvour gouzafvat, gant ur gorvez hag un ampled reoliadus.

respiration paradoxale ◇ **paradoxical respiration** ◇ **analerezh diac'hinek** Korvez analañ arsellet e degouezh igorad ur grezenn : ar skeventenn en tu-se a volc'h da-geñver an ec'hanañ hag a flak da-geñver an enanalañ.

respirométrie radiométrique ◇ **radiometric method** ◇ **analventerezh skinventadel** Kalvezder dinoiñ herrek ar mikobakteri dre vuzuliañ ar CO₂ tiellet gant karbon 14, dilaosket gant ar bakteri o tiñvañ en ur metoù liñvel, ennañ trenkenn balmitek tiellet gant karbon 14 (sl. *tuberculose* et *Mycobacterium*).

Respirovirus ◇ **Respirovirus** ◇ **Respirovirus** Genad virus gougevret ouzh iskerentiad ar *Paramyxoviridae*.

responsabilité sans faute ◇ **atebegezh b. hep fazi** Meizad lezennvezegel en araez da gantreizhañ da gaout gwirioù evit bezañ dic'haouet, pa en devez ur gwez mezegel devoudet ur c'haouadenn, hep ma ve prouet emañ ur fazi en orin an darvoud (sl. *aléa thérapeutique*).

ressaut : signe du ~ ◇ **1 2 Ortolani's click** ◇ **1, 2 & 3 arouez b. an diskrog** 1 Arouez a dorr gwir gouzoug askorn ar vorzhed : o vezañ ma n'eo ket darsiket an torr, sachadennoù gant an dorn a zire aes ar c'hammlakadur; hogen, pa vez paouezet a sachañ, ez adkrog hennezh, gant un diskrog a-daol hag ur gouriñviad bras. 2 Heñvelster gant *arouez Ortolani-Le Damany*, sl. *Ortolani-Le Damany : signe d'~*. 3 sl. *Hughston : signe d'~*.

restaurants chinois : syndrome des ~ ◇ **chinese restaurant syndrome** ◇ **azoniad g. ar pretioù sinaat** Teskad ar strafuilhoù arsellet a-wechoù etre 15 ha 30 munud goude bezañ debret en ur preti sinaat : loskadurezh laurus o saezhenniñ eus ar c'hef war-du an trobarzh, santad flastr an dremm, amvoustr ar bruska. An erzerc'hadoù-se — a steuz ent emdarzh en un nebeut munudoù pe etre un pe ziv eurvezh — a arzoder d'an L-glutamát monosodek arodet d'ar bouedoù evel oc'huzenn.

resténose ◇ **restenosis** ◇ **adisvoll g.** Addinodadur un isvoll (san, igorenn), ezvevennet a-gent.

restitutio ad integrum ◇ **restitutio ad integrum** ◇ **restitutio ad integrum** Aspiaouañ ur stad par d'an hini a oa a-gent : ent dibarek a-zivout torroù, pa vez peurvat disoc'h ar prederiadur.

resynchronisation ◇ **resynchronization, resynchronizing** ◇ **dazgoubredañ** Lemel un ec'houbred, un disgoubred, war-benn adlakaat diaser daou zarvoud. — **dazgoubredañ kofigel** Gl. *r. ventriculaire* Sz. *ventricular r.* : hentenn brederiañ ergemennet gant lod er skorted kalon c'hrevus gant ec'houbred argreñ kofig (erzerc'het dreist holl dre un tolc'had barr klok). E zewerc'hañ a reer dre fraouaat kalon liesload daougofigel.

rétention ◇ **retention** ◇ **azderc'hel, azdalc'h g.** Hogennadur un danvezenn sonnel, liñvel pe aezhel er ganol amkanet d'he c'harzhañ, en dastumva he endalc'h ent naturel pe el limf o c'hronnañ ar gwiadoù. An danvezennoù azdalc'het evel-se a ampar un dañjer, pe dre berzh o ec'honad, pe dre berzh ar pistriadur devoudet ganto.

rétention biliaire ◇ **bile retention** ◇ **azdalc'h bestl** Hogennadur bestl er gellenn vestl, devoudet gant ur skoilh war ar forzhioù degorzhañ.

rétention chlorurée ◇ **salt retention** ◇ **azdalc'h Cl⁻** Azdalc'h an ion Cl⁻ er bevedeg e dianlen ul leiadur eus o ezvevennidigezh gant al lounezhi.

rétention placentaire ◇ **retention of placenta** ◇ **azgannad g. torzhienn** (sl. *enchatonnement placentaire*).

rétention des lochies ◇ **lochiometra, lochiostasis** ◇ **azgannad g. olliñv, olliñv azgannat** (sl. *lochiométrie, rétention des lochies*).

rétention urinaire ◇ **urinary retention** ◇ **azdalc'h troazh, troazhazdalc'h** Dic'halluster da ec'hodiñ troazh (troazhodiñ, dioulañ), tra ma kendalc'h al lounezhi da vorc'hañ troazh ent vonan, diwar ur skoilh treloc'hel pe un tanijennadur sezet er forzhioù troazhañ.

rétentionniste ◇ **retention** ◇ **troazhazdalc'heg g. -eion** Gouziviad an azdalc'h troazh a lavarer ez eo troazhazdalc'hek hag ez eus anezhañ un troazhazdalc'heg.

rete testis ◇ **rete testis** ◇ **rete testis** Heñvelster gant *rouedad ar glidenn*, rouedad kanoligoù spergaser loet e poullkreiz ar glidenn.

Réthi : opération de ~ ◇ **Réthi's operation** ◇ **oberatadenn b. Réthi** Skejañ kigennoù nesaer ar c'harloc'henn sezet en o lec'h enlanañ war ar migorn picherek ; gwezhiadenn dewerc'het e degouezh seizi daoudu an nervennoù kilreder.

Réthoré : syndrome de ~ ◇ ◇ **azoniad g. Réthoré** Heñvelster gant *trizomiezh darnel 21 q 22*, kleñved dre c'houkoevad kromozomel o naouiñ dre gammneuziadoù daskenek, kloppenndremmel ent dibarek.

réticulé : système ~ ou **réticulée : formation** ~ ou **substance** ~ ◇ **formatio reticularis** ◇ **reizhiad b. rouedek** Teskad nervgelligoù stallet e rouedad stank a-hed ar c'hef empenn, eus rannbarzh an hirvel izel d'ar gouzerc'hvel a-gostez hag a-dreñv. Pouezus kenan eo an dasperzhiadur anezhi er c'henurzhañ hag er c'hendodiñ, dre reoliñ an oberiezhoù empenn-livenn (a-getep dre ar reizhiad a-sevel blivaer ha dre ar reizhiad a-ziskenn heuder ha herouezer), dre arouleviañ an tant diaboz hag an defrou, dre zegemer ha dre gevanekaat an holl santadoù a zegouezh en empenn ha dre zelanvadiñ an arc'hwelioù struzhel.

réticulémie ◇ **reticulæmia** ◇ **retikulemiezh b.** 1 Bezañs er gwad eus kelligoù bonan pe gleñvedel a'r reizhiad retikuloendotelel (sl. *réticulo-endothéliose*). 2 Heñvelster gant *histioleukemiezh*, seurtad retikuloendotelioz dezhañ un dedro yud, naouus dre un eritroderma hollekaet, un tizhad a'r flugez diseurt en e astenn ha dre vezañs, er gwad, eus kelligoù euzhek o tont eus ar reizhiad retikuloendotelel.

réticulide ◇ ◇ **retikulid g.** Erzerc'had kroc'henelel ar retikuloendoteliozoù.

réticuline ◇ **reticulín** ◇ **retikulin g.** Seurtad kollagen — **gwiennoù retikulin** : gwiennoù kollagen tanav kenan.

réticulite ◇ **reticulitis** ◇ **retikuloendotelennfo g.** Tanijennadur ar gwiad retikuloendotelel.

réticulocytes ◇ **reticulocyte** ◇ **retikulokit s.** 1 Hemati greunek. 2 Kellig a'r gwiad retikuloendotelel.

réticulocytose ◇ **reticulocytosis** ◇ **retikulokitoz g.** Bezañs retikulokit er gwad, paot pe baotoc'h, naouus da amwadoù diseurt. Gwadvec'h reol ar retikulokit zo bihanoc'h eget 2 %.

réticulo-endothérial : système ~ (**SRE**) ◇ **Reticulo Endothelial System (RES)** ◇ **reizhiad b. retikuloendotelel (RRE)** Heñvelster gant *reizhiad retikulohistioitel (RRH)* (Gl. *système réticulo-histiocytaire (SRH)*). Hervez meizadur (dispredet) Aschoff, teskad kelligoù a orin mezenkimatus dasparzhet er gwiadoù daskenek, araezus da evuriñ ar rannigoù sonnel (fagokitoz) ha da gadaviñ al livuzennoù kembevus (karmin litinet, glaz tripan) : kelligoù a un natur an holl anezho, en araez d'endrezfurmiñ an eil re er all ha da c'henelel an darn vrasañ eus kelligoù ar gwad (bongelligoù), ar monokit pergen. Hiziv e tigemmer : — 1° **reizhiad ar fagokit mononuklear** evodet eus ar monokit (ganet e mel an eskern) ; amparet eo gant makrofag pe histiokit, fest, bezant er gwiad kenglenele, e funelloù (ha godoù 'zo zoken) eus ar felc'h, er mel eskern hag er gwerblennoù, el logigoù skevet hag e kelligoù Kupffer a'n avu ; — 2° **reizhiad ar c'helligoù gouskor**, kevarall diouz ar re gent (ar c'heñverioù etrezo zo anavezet fall) : kelligoù rouedek, kelligoù endotelel an naoz wazhiedel ha fibroblast ; bihan eo o ferzh fagokitañ.

Bonel eo dasperzhiadur an RRE er c'harzhañ. Ar makrofag, dre evuriñ (fagokitañ) kement rannig estren a zo war al lec'h (bakteri, arvevaded, drailhennoù kelligoù, aozadoù anvev), a gemer perzh en un doare anspeadalel e difenn ar bevedeg ; keveliñ a reont ivez en enaoz rannoù 'zo a'r glokaenn, al lizozim, an interferon hag an antikorfoù (sl. *phagocyte, macrophage hag histiokit*).

réticulo-endothéliosarcome ◇ ◇ **retikuloendoteliosarkom g.** Seurtad retikulosarkom, ar c'helligoù anezhañ o vezañ e deroù o diforc'hekadur endotelel.

réticulo-endothélieuse ◇ **reticuloendotheliosis** ◇ **retikuloendotelioz** g. Heñvelster gant *retikulohistiokitoz*, *histiokitoz*, *retikuloz*, *retotelióz* : anvad rumm un teskad anaeziou naouus dre neridigezh rizhek pe anrizhek elfennoù piaouel ar reizhiad retikuloendotelel. Emañ an neridigezh-se en araez da vezañ hollek (felc'h, gwerblennoù, avu, kroc'hen, skevent, eskern, gwad, kahe rioù) pe lec'hiek. — Deskrivañ a reer *retikuloendoteliozoù eilvedel* da boreadoù pe da arvevadegezhioù 'zo (paludegezh, kala-azar, mononukleoz poreel, enkalonemfo gorrek, terzhienn difoidel, torzhellegezh, h.a.), da strafuilhoù hangaeel (divigadoù ganed-igel, histiokitoz lipokromez familhel, limfohistiokitoz familhel, kleñved Rosai ha Dorfman) pe, devoudet gant ur migennevid (*retikuloendotelioz* dre usvec'h, en o zouez kleñvedoù Gaucher, Niemann-Pick, Schüller-Christian, ar gangliosidozioù o vezañ ar re anavezetañ). — *retikuloendoteliozoù kentael*, ansavelet o nozologiezh, ha hogos bewech yud, lemm an dedro anezho (histiokitoz X, histiokitoz yud, retikuloz goulemm ar vagadell a zedro yud), pe, dibaotoc'h, henek (furm leteñvel ouzh an histiokitoz yud, o tedreñ en un nebeut bloavezhioù avat), a-wechoù, neoazh, kuñv (*retikuloendotelioz* lemm ar bugel). Ur rummatadur nevez eus an histiokitozioù zo bet kinniget e 1987 gant an *Histiocyte Society*. sl. *histiokitoz*. — Nesaet e vez a-wechoù ar retikuloendoteliozoù da gleñved Hodgkin, d'al leukemiezhoù monokitel, d'ar retikulosarkomoù, da gleñved Besnier-Bœck-Schaumann (sl. *histiokitoz yud*, *histiokitoz X*).

réticulo-endothélieuse aiguë de l'enfant ◇ **benign acute reticuloendotheliosis of children** ◇ **retikuloendotelioz g. lemm ar bugel** Anaez lemm o tarvezout gant ar bugel, o naoüñ dre un azoniad poreel (terzhienn uhel, fillidigezh), un dispuilhad kroc'hen, un tizhad limfoidel (gorank, c'hwarennoù muiek, avufelc'husvent), un dedro hir o padout meur a vizvezh dastroc'het a resmiadoù, o tisoc'h war ar pare. Bez' ez eus un amwad leiek gant gourelwenn argrenn ha mononukleoz. Dianav eo an arbenn. Anafoù gwiaadel ar gwerblennoù zo disheñvel diouzh ar re diwar an mononukleoz poreel ; naoüñ a reont dre un neridigezh gourfaot eus al leukokit (sl. *histiokitoz X*).

réticulo-endothélieuse familiale avec éosinophilie ◇ **familial reticuloendotheliosis with eosinophilia** ◇ **retikuloendotelioz g. familhel gant eleozinofil** Kleñved hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, naouus dre un dispuilhad eritematus c'hwezhiennek eus ar c'hroc'hen hag ar glaourgennoù, dre ur c'hoefvadur eus ar gwerblennoù, eus an avu hag ar felc'h, dre boreadoù kroc'hen, lagad ha skevent ha dre un dedro marvus dindan un nebeut mizvezhioù. Bez' ez eus un eleozinofil muiek er gwad hag un ensiladur eus an derm gant eozinofil, limfokit ha histiokit.

réticulo-épithéliome ◇ **reticuloepithelioma** ◇ **retikuloepiteliom** g. Seurtad retikulosarkom dezhañ naouusterioù gwiaadel a 'n epiteliomoù.

réticulo-histiocytose multicentrique ◇ **multicentric reticulohistiocytosis** ◇ **retikulohistiokitoz g. lieslec'hiat** Kleñved an oadour yaouank o naoüñ dre ul liesarzo muturnius gant muiegezh e par ar bizied, nozelennoù kroc'henel ha glaourgenneel, lec'hiet a-wechoù e par ar skevent, ar c'hrezoù, ar poullkreiz hag ivez dre un tizhadur eus ar stad hollek gant terzhienn, c'hwarnnoù pe gaherfo. Ensilet e vez an anafoù gant histiokit enno vakuolennoù lipid ha keurgelligoù a-wechoù. Rumm et eo ar c'hleñved-se e-touez ar retikuloendoteliozoù usvec'h.

réticulo-histiosarcome ◇ **retikulohistiosarkom** g. Seurtad retikulosarkom nes d'an histioblastom.

réticulolymphosarcome ◇ **retikulolimfosarkom** g. Seurtad retikulosarkom, ar c'helligoù anezhañ o vezañ bet un deroù diforc'hekadur gwadparadel etrezek an ac'had limfel.

réticulomatose ◇ **retikulomatoz** g. Seurtad retikuloendotelioz ma forc'h ar c'helligoù rouedek nebeut pe tamm ebet diouzh ar rizh reol, kuit a nep yuted.

réticulopathie ◇ **reticulopathy** ◇ **retikulopatíezh** b. Anaez a 'r reizhiad retikuloendotelel.

réticuloplasmocytome ◇ **reticuloplasmocytoma** ◇ **retikuloplasmokitom** g. Plasmokitom, ennañ kalz a gelligoù rouedek a rizh histioblastel.

réticulosarcomatose ◇ **reticulosarcomatosis** ◇ **retikulosarkomatoz** g. Seurtad retikulosarkom naouus dre zinodadur an neridigezh yud e lies tiriad kevarall a 'r reizhiad retikuloendotelel.

réticulosarcome ◇ **reticulosarcoma** ◇ **retikulosarkom** g. Yoc'henn yud e dianlen neridigezh hanweel kelligoù rouedek ar mel eskern pe ar gwiadoù limfoidel.

réticulose ◇ **reticulosis** ◇ **retikuloz** g. Nep anaez naouus dre un neradur eus ar c'helligoù rouedek (kelligoù gouskor) hag eus an histiokit (makrofag). Kemm a vez lakaet etre ar retikulozioù kentael : histiokitozioù yud, a nesaer outo kleñved Hodgkin hag ar retikulosarkomoù, hag ar retikulozioù eilvedel da boreadoù evel ar c'hala-azar pe dre usvec'h evel kleñved Gaucher, kleñved Hand-Schüller-Christian, h.a.

réticulose familiale avec hépatosplénomégalie et adénopathies ◇ **familial reticulosis with hepatosplenomegaly and adenomegaly** ◇ **retikuloz familhel gant avufelc'h- ha gwerblennusvent** Retikuloendotelioz familhel gant dreistfelc'hgezh ha γ -globulinwadisvec'h, a zedro kuñv.

réticulose hémophagocytaire ◇ **histiocytic medullary reticulosis** ◇ **retikuloz hemofagokitel** (sl. *lymphohistiocytose familiale*).

réticulose subaiguë à évolution maligne du nourrisson ◇ **histiocytic medullary reticulosis** ◇ **retikuloz goulemm a zedro yud ar vagadell** Seurtad retikuloz ar vagadell naouus dre gevreted anafoù kroc'hen trouskennek ha purpurek hag erzerc'hadoù skevent : trec'hwez ha dulaz gant, war ar skinnlunioù, skeudennoù rouedek pe nozelanek a-strew ha gloevennoù emfizem. Dedreñ a ra etrezek ar marv dindan un nebeut mizioù. Bez' ez eo ur seurtad a gleñved Abt-Letterer-Siwe.

réticulotrope ◇ ◇ **retikulotropek** aa. Lenidik ouzh ar reizhiad retikuloendotelel.

réticulum ◇ **reticulum** ◇ **rouedad** g. Da skouer, rouedad gwiennoù, gwazhied.

réticulum endoplasmique ◇ **endoplasmic reticulum** ◇ **rouedad endoplasmek** Rouedad pibanoù ha c'hweziganoù loet er c'hitoplasm, dezho un arc'hwel borc'hañ ha kadaviñ, o tasperzhiañ e bevenaoz ar proteinoù, ereet a-wechoù ouzh ar ribozomou (sl. *Golgi* : *appareil de* ~).

rétine ◇ **retina** ◇ **luc'hsae** b. Organ ar gweled, bennozh d'ar c'helligoù luc'heraezus (hinkinoù ha kegelioù). Eus an teir sae a 'l lagad ez eo an hini diabarshañ, loet etre an dolgennsae hag ar c'horf gwerek. Amparet eo blein adreñv al luc'hsae gant ar vrizhenn dezhi arvez ur bokenn arvelen, ma emañ ar gizidigezh en he gwellañ, en he c'hreiz ur pukad, ar rioul kreiz (Gl. *fovea centralis*). Al luc'hsae zo ur gennenn voull dezhi 0,2 mm tevder, amparet gant kelligoù navel ha neuroglie. C'hoarvezout a ra eus dek haen, eleze, eus an diabarzh d'an diavaez : al lienenn vevennus diabarzh, haen ar gwiennoù gweled, haen ar c'helligoù kangrennel, an haen blezhadek diabarzh, an haen graoñellek (greunek) diabarzh (amparet gant kraoñelloù ar c'helligoù daouglein), an haen blezhadek diavaez, an haen graoñellek diavaez, al lienenn vevennus diavaez, haen an hinkinoù hag ar c'hegelioù, hag an epitelienn livegat. Ereet eo an haenoù-se dre wiennoù kenglenel (gwiennoù Müller), ar bleñchoù anezho oc'h amparañ al lienennoù bevennus.

rétinite ◇ **retinitis** ◇ **luc'hsae**fo g. Tanijenn, lemm pe henek, al luc'hsae.

rétinite actinique ◇ **actinic retinitis** ◇ **luc'hsae**fo aktinek Luc'hsaefo devoudet gant an ardizh hirbad ouzh luc'hskinoù kreñv.

rétinite albuminurique ◇ **retinitis albuminurica** ◇ **luc'hsae**fo troazhalbuminek Luc'hsaefo ambrougat ur gouliñv trovegenel, naouus d'al lounezhadoù.

rétinite circinée ◇ **circinate retinopathy** ◇ **luc'hsae**fo kelc'hennek Luc'hsaefo o naouiñ dre vezañs takadoù gwenn, luc'hus, stalet e stumm ur walenn en dro d'ar vrizhenn, dezhañ lies arbenn.

rétinite pigmentaire ◇ **pigmentary retinopathy** ◇ **luc'hsae**fo livegennek Dic'henezhadur argreskus al luc'hsae, gant livegadur hag isteñv, naouus dre goc'hionadur livegennoù, steviadur gwazhied al luc'hsae, strishadur ar gwelvaez hag ur bouc'hwel amheol. Anezh familhel hêrezhel o tinodiñ er bugelvezh hag o tevoudañ an dallentez.

rétinite solaire ◇ **solar retinitis** ◇ **luc'hsae**fo heolel Anafoù al luc'hsae devoudet gant an ardizh rageeun ouzh ur gouloù kreñv.

rétinoblastome ◇ **retinoblastoma** ◇ **retinoblastom** g. Yoc'henn yud ar bugel yaouank, diwar epitelienn al luc'hsae, dre neradur kelligoù andiforc'hek (retinoblast). Anezh eilvedel d'un dargenad daouel.

rétinocytome ◇ **retinocytoma** ◇ **retinokitom** g. Yoc'henn yud al luc'hsae (seurtad retinoblastom) amparet gant kelligoù diforc'hekaet endeo, ar c'helligoù e stumm rodigoù pe stefanokit. Tizhout a ra ar bugel yaouank.

rétinographie ◇ **retinography** ◇ **luc'hsae**luniñ Luc'hskeudenniñ deun al lagad.

rétinoïde ◇ **retinoid** ◇ **retinoid** g. Deverad ar vitamin A dezhañ ur gwered skoilhañ ouzh neridigezh ar c'helligoù epitel.

rétinopathie ◇ **retinopathy** ◇ **luc'hsae**ad g. Termen genadel o teanviñ nep anez a 'r luc'hsae.

rétinopathie diabétique ◇ **diabetic retinopathy** ◇ **luc'hsae**ad diabetel Luc'hsaead naouus dre naouezennoù gwenn hag annonioù gwadliñvel, e dalc'h an diabet. Rouestlad grevus kenan al lavwazhiedanaez, o tevoudañ an dallentez dre dizhad ar vrizhenn.

rétinopexie ◇ **retinopexy** ◇ **luc'hsae**Aanlenañ AAAnlenañ al luc'hsae ouzh an dolgennsae.

rétinoschisis ◇ **retinoschisis** ◇ **luc'hsae**avizlid g. Disfaut haenoù diabarzh al luc'hsae, sezet en haen blezhadek diavaez, e dalc'h un dic'henezhadur kistel. Dedeñv a ra alies etrezek un diflosk a 'l luc'hsae.

retour de couches ◇ **first menstruation after childbirth** ◇ **distro** ar mizioù goude gwilioud Distro ar mizioù etre 6 ha 8 sizhunvezh goude ar gwilioud, diwezhatoc'h alies (lies mizvezh), e degouezh al laezhañ mammel dreist holl.

retours veineux anormaux ◇ **abnormal venous return** ◇ **distrioù gwazhiennel ezreol** Difourk ezreol, er galon, er gwazhiennoù skevent ha kav, diwar un diouer diorreadur rizhellel eus ar galon hag eus ar gwazhied. — 1° Un pe lies gwazhienn a 'r skevent (Gl. *Retour veineux pulmonaire anormal* Br. *distro ezreol eus gwad ar skevent* Sz. *anomalous pulmonary venous drainage*) a zinaou er c'hentez dehou, er wazhienn gav uhelañ, er wazhienn vrec'h-penn kleiz, en ur wazhienn gav uhelañ kleiz pe er wazhienn gav izelañ (sl. *cimeterre* : *syndrome du* ~) : ezreolder diouzañvet mat peurvuiañ, nemet e tizhfe holl wazhiennoù ar skevent ; ur c'hehentaed etre-kentezoù a vez kevredet alies. — 2° Triel, pevarel eo ar gwazhiennoù kav en o savlec'h reol, pe a zinaou er c'hentez kleiz pe er god kuruner.

rétractilité ◇ **retractility** ◇ **didennusted** b. Perzh ur gwiaed da zistreiñ d'e vent kent goude bezañ bet dardennet la rétractilité est la propriété d'un tissu de revenir à sa dimension antérieure après avoir subi une distension.

rétraction ◇ **retraction** ◇ **1 didennañ 2 krizañ, angrizañ, kurzhañ** 1 Anadenn fizikel, da skouer : *didennañ reñverek ar valvenn en arouezioù Kocher*. 2 Kemeradurioù bevoniel, bevedourel (ha buhezel, a-wechoù), da skouer : a) *krizañ kraoñell ar gellig* er piknoz ; b) *angrizañ lientirenn ar palv* e kleñved Dupuytren ; c) *kurzhañ ar gaouledenn* didennañ : un anadenn fizikel eo ; lezel a rafen gant krizañ, angrizañ ar c'hemeradurioù bevoniel ha buhezel.

rétrécissement ◇ **stenosis** ◇ **1 enkaat, enkadur g. 2 strishadur g., strishaenn b. 3 isvoll g.** 1 Leiadur treuzkiz ur ganol, ur wazhiedenn, ur faout (hini ar malvennoù, da skouer), ur gwask (hini ar porzhier, da skouer). 2 Termen nes ar ster anezhañ d'an hini a-raok, bihanadur un treuzkiz (*strishadur naoz ar c'horrwazhied*), bihanadur ur maez (*strishadur ar gwelvaez*), un igorenn (*strishadur ar youlc'h, strishadur ar c'hargadenn*). Gant *strishaenn*, e teskriver disoc'h ur strishaat, pe un ode enk war ur ganol, ur funell, ur gavenn. 3 Leiadur kleñvedel padek kavnez un igorenn, ur ganol pe un organ kleuz, ganediged pe arzeuat (sl. *sténose*).

rétrécissement aortique ◇ **aortic stenosis** ◇ **isvoll an aortenn, isvoll aortek, strishadur aortek** Naoued trapigel ar galon naouus dre isdigor sac'helloù kornloarek gwask an aortenn e-doug lankad an diflistrañ sistolek hag o tec'han un usteñv kengreiziek eus ar c'hofig kleiz. Ent nozografel e tiforc'her :

- an isvoll aortek ganediged a c'hell bezañ
 - ▷ a-wask, dre gempegad klok pe glokoc'h ar freilhoù kornloarek
 - ▷ endan-wask, dre ur stiv stirek endan-gornloarek
 - ▷ us-gwask, a-us da c'hod an aortenn a-wechoù kevret gant un isvoll eus gwazhied bras diaz ar galon hag ar barroù talmerel a-skevent war un dro gant iswe an aortenn a-sevel;
- an isvoll aortek arzeuat diwar remm, pe, ent koshoc'h, a-geñver gant ur skleroz hag ur razeakaat argammedek

rétrécissement congénital de l'orifice pulmonaire, sténose pulmonaire orificielle ◇ **pulmonary stenosis** ◇ **isvoll ganediged ar gwask a-skevent, strishadur ganediged ar gwask a-skevent** Benvegad an trapigoù a-skevent, naouus dre un isdigor eus ar gwask. Neuz ar strishaenn zo peurliesañ ur gouc'hell vouk pe stirek, tro e argein ouzh kef an dalmerenn a-skevent, en he c'hreiz un igorad enk pe enkoc'h, forzh nemeti da ziflitr ar c'hofig dehou. Seurt isvoll a zec'han usteñv ar c'hofig dehou. Kuret e vez dre an trapigenbenañ a-skevent pe a galon serr (beradenn Brock), pe a galon digor dindan skoevedad.

rétrécissement mitral, sténose mitrale ◇ **mitral stenosis** ◇ **isvoll an trapig kentez-kofig kleiz, isvoll mintrek** Kalonnaoued trapigel naouus dre isdigor an tremen etre ribl rez an div sac'hell vintrek, o tevoudañ un uswask er c'hentez kleiz ha, da heul, er gwazhiennoù hag er c'horrwazhied skevent. A orin remmel hogos bepred e vez an isvoll mintrek kevret gant kempegad ar freilhoù, tevaat ar sac'helloù gant pe hep razeakaennoù ha berraat ar c'herdad stirennek.

rétrécissement pulmonaire, sténose pulmonaire ◇ **pulmonary stenosis** ◇ **strishadur a-skevent, isvoll a-skevent** Kalonnaoued trapigel ganediged peurvuiañ, digevret pe kevret gant kammneuziadoù all an dilhenn etre-kofigoù, ar c'hentezioù hag ar c'hofigoù ha naouus dre leiad padek kavnez ar gwask a-skevent.

rétrécissement tricuspideen, sténose tricuspideenne ◇ **tricuspid stenosis** ◇ **isvoll an trapig kentez-kofig dehou, isvoll tribroudek** Kalonnaoued trapigel a orin remmel peurvuiañ, alies kevret gant un isvoll mintrek, a-wechoù un isvoll aortek, naouus dre leiad kavnez ar gwask tribroudek, o tec'han un uswask er c'hentez dehou.

rétrécissement valvulaire, sténose valvulaire ◇ **valvular stenosis** ◇ **isvoll trapig** Leiad padek kavnez gwask un trapig er galon, o skoilhañ beradur ar gwad, gant muiadur ar gwask en argrec'h ha leiadur al lanv en ardraoñ. Peurliesañ ez ezerc'h an isvoll trapig ouzh ar selaouennañ dre ur sourr diflitr, sistolek pe diastolek; hemañ a adanver anafel pa sav diwar un daskemm stummadel eus ar benvegad trapigel, arc'hwelel pa sav diwar ur muiadur eus kas ar gwad dre ur gwask bonan e stummadur.

rétroalvéolie ◇ **alveolar retrusion** ◇ **drekstouad g. al logigoù** Stouad war-dreñv ezreol logigoù ar rakdent krec'h pe traoñ.

rétrochéilie ◇ **retrocheilia** ◇ **drekload g. ur weuz** Load war-dreñv ur weuz.

rétrocolis ◇ **retrocollis** ◇ **drekamm g.** Seurtad pennngamm m'emañ ar penn stouet war dreñv, da heul dargrezad kigennoù an askil.

rétrocontrôle ◇ **feedback** ◇ **korwered g.** Argerzh bevedel ma c'hell drezañ argemmadur an enborc'hañ gant ur wagrenn vuk degas skoilh pe lank en enborc'hañ ar stimulin gant ar c'hougorfenn.

rétroréflexion de l'utérus ◇ **retrodeviation of the uterus** ◇ **drekwariañ ar grozh** Teskad an ezreolderioù eus savlec'h ar grozh o c'hoarvezout eus an drekc'hweladoù hag an drekplegadoù.

rétroréflexion ◇ **back scattering** ◇ **kilskignañ** Skignadur skinadoù pe rannigoù hervez ur c'horn tougn gant roud an hordenn dehaezet.

rétroréflexion de l'utérus ◇ **retroflexion of the uterus** ◇ **drekplegad ar grozh** Savlec'h ar grozh ma vez eilpennet war dreñv korf ar grozh hep dilec'hiadur a r gouzoug, seurt ma vez ur c'horn lemm a-dreñv etre ahel ar c'horf hag ahel ar gouzoug.

retrogène ◇ ◇ **retrogenenn u., s. : retrogen** Luniad nes da hini ur c'henenn, o c'hoarvezout eus DNA azeilet diwar an RNA kannad, dindan wered an transkriptaz gindro. An kez DNA, hep intron, zo angweredek. An daskevanekadur dargouezhel anezhi er genom a zec'han furmadur gaouc'hen'zo.

retrogénie ◇ **retrogenia** ◇ **drekload g. an elgezh** Kammneuziad anezhañ iskresk an elgezh (sl. *latérogénie, progénie*).

retrognathie ◇ **retrognathia** ◇ **dregavenegezh b., drekkarvanegezh b., drekgavedegezh b., drekload g. ar garvan, drekload ar c'haved** Load a-dreñv ur garvan pe ar c'haved.

retrograde ◇ **retrograde** ◇ **1 kizren, kizreat aa. 2 kilred aa., a-gilred 3 diabellat aa.** 1 A-zivout ur red tredan o vont war e giz. 2 A-zivout red ul liñvenn — evel ar gwad, da skouer — o vont war gil. 3 A-zivout an ankoun e lakaer kemm etre an *ankoun diabellat* : andaskoun eus an eñvorioù a-gozh hag an *ankoun dianezat* : andaskoun an eñvorioù a-nevez.

- rétrolystésis** ◇ **rétrolystesis** ◇ **dreklinkad g.** Riklad war dreñv eus ur vellenn e-keñver ar vellenn a-is.
- rétromandibulie** ◇ **retromandibulism** ◇ (sl. **rétrognathie**).
- rétropéritonite calleuse** ◇ **retroperitonitis** ◇ **dregampelenno g. karnegel** Tanijennadur ar gwiad kenglenel drek-ampelenn gant tevadur ha skleroz an ampelenn.
- rétropneumopéritoine** ◇ **retroperitoneal pneumogram** ◇ **dregampelenn-aezhad g.** Ensinkladur aezhenn en tachad drek-ampelenn.
- rétroposition de l'utérus** ◇ **retrodeviation of the uterus** ◇ **drekload ar grozh** Diskas war dreñv ar grozh, hep distummadur, peurliesañ diwar-bouez ur yoc'henn dispaket dirazi.
- rétropulsion** ◇ **retropulsion** ◇ **1 dregoriñ 2 dregorad g. 3 drekkorzhañ** 1 Dilec'hiadur war dreñv ur parzh eus ar c'horf. 2 Emstumm o tisoc'h diouzh an dregoriñ 3 strafuilh diasavel anezhañ an tuadur da gouezhañ war dreñv, hep an dastaolioù ret da zerc'hel ar c'hempouez.
- rétrosellaire** ◇ **retrosellar** ◇ **drek-dibr aa., drekdibrel aa.** Loet a-dreñv d'an dibr turkek.
- rétrotraction** ◇ **retroflexion of the body** ◇ **1 drekstouiñ 2 drekstouad g.** 1 Plegañ ar c'horf war dreñv, devoudet, gant klañvourion 'zo — e *kleñved Parkinson* —, el loadur war sav, gant an argrezañ andiarvenn eus kigennoù a-loan. 2 Emstumm o tisoc'h eus an drekstouiñ.
- rétrotranscription** ◇ **retrotranscription** ◇ **kildreuzskripañ** Azeilañ DNA dewerc'het gant an transkriptaz gindro.
- rétrotubérite** ◇ ◇ **gargadennasplegfo b.** Tanijennadur aspleg ar c'hargadenn. Savet fall eo ar ger gallek hag arveret dibaot.
- rétroversion de l'utérus** ◇ **retroversion of the uterus** ◇ **drekload ar grozh** Savlec'h ar grozh eilpenet war dreñv hep distummadur, eleze gant durc'hadur ar gouzoug war raok ha war grec'h.
- Retroviridae** ou **Rétroviridés** **Retroviridae** **Retroviridged** l. (g.) Kerentiad bras a viruzoù gant RNA undigorvell, dezho 100 nm a dreuzkiz, ur c'hapsida a gemparzhegezh diñsek, hag araez da dreuzskripañ o genom RNA e DNA, bennozh d'o zranskriptaz gindro. En araez emañ neuze ar retroviridged da enteñ e genom DNA ar c'helligoù ma kav bod, da c'hougevaniñ outañ ha da vezañ treuzkaset a-ser gant ar genom-se. Revout a ra neuze ar retroviruz e rezh div furm : — 1° *rez*, elfenn hilel gant RNA heloc'h a c'hell tremen eus ur gellig d'unan all ; — 2° *gougevan* ouzh genom ar gellig diwar-bouez e dreuzskrivadur e DNA : furm rekis da nerñ. Ar *R.* zo ar viruzoù hanweiat kiriek da leukemiezhoù ha da gankroù al loened (sarkom Rous, da skouer) ha marteze an den (azoniad an hangaezivig arzeuat pe haza) (sl. **Retrovirus-HTLV**, **Spumavirus**, **Lentivirus**).
- rétrovirus** ◇ **retrovirus** ◇ **retroviruz g. -où** Anvad genadel ar viruzoù eus kerentiad ar Retroviridged.
- Rett : syndrome de** ~ ◇ **Rett's syndrome** ◇ **azoniad g. Rett** Empennaoued dianav e orin oc'h erzerc'hañ etre 6 hag 18 miz gant ar plac'hig vihan war-lerc'h ur prantad a ziorreadur reol, dre un argizadur eus ar piaouekadurioù, dinod ur bloc'heilañ dornel, dre varradoù glizi, korrgloppenengezh ha miarc'hwelioù analadel.
- Retzius : espace de** ~ ◇ **retropublic space** ◇ **tachad g. drek-kaezour** Egorenn c'horreek etre ar c'haezour ha talbenn araok ar c'hwezhiell.
- revaccination** ◇ **revaccination** ◇ **eilvaksinañ g.** Eil diounezadur vaksin e sell da azgrenaat un hangae arzeuet da heul ar c'hentavaksinadur hag a zo aet blin gant an amzer.
- revascularisation** ◇ **revascularization** ◇ **azgwazhiediñ, aderoeriañ** Assav amred ar gwad en un tiriad heskwadek.
- Reverdin : aiguille de** ~ ◇ **Reverdin's needle** ◇ **nadoz b. Reverdin** Nadoz marc'het ouzh un troad, outi war gostez, e-kichen ar beg, un ask treuzfurmadus en un toull diwar-bouez ur c'harenn vetal heloc'h.
- Reverdin : greffe de** ~ ◇ **Reverdin's method** ◇ **imboudañ g. Reverdin** Imboudañ ezkroc'henele a imboudennoù bihan dezho un treuzkiz 3 pe 4 mm.
- réversibilité** ◇ **reversibility** ◇ **eiltroüsted b.** Galluster da zistreiñ d'ur stad kent.
- réversion** ◇ **reversion** ◇ **gindreñ, dargenañ gindro** Dargenañ o c'hoarvezout a-c'hindro d'un dargenañ kent, o kas etrezek ar fenotip deroù.
- révision utérine** ◇ ◇ **azgwelout ar grozh** Gwiriañ gant an dorn gouloder ar grozh war-lerc'h ar gwilioud.
- reviviscence** ◇ **reviviscence** ◇ **dazbevusted b.** Gouested o deus bevion 'zo da zont oberiat en-dro goude ur prantad hir a veved enketel er stad disec'h ma c'hellont gouzañv gwrezverkoù betek -273°C.
- révolution cardiaque** ◇ **cardiac cycle** ◇ **trovezh b. ar galon** Kenheuliad al lankadoù dewerc'het gant ar galon e-doug an arc'hwel anezhi, ar sistol hag an diastol pergen.
- révulsif** ◇ **revulsive** ◇ **1 destrummus aa. 2 destrummuzenn b.** 1 En araez da zevoudañ un destrummañ. 2 Lia destrummus.
- révulsion** ◇ **revulsion** ◇ **destrummañ** Lakaat ar gwad da zont a-fonn, da zevoudañ ur strumm gwad en ur parzh eus ar c'horf.
- Reye** ou **Reye-Johnson : syndrome de** ~ ◇ **Reye's syndrome** ◇ **azoniad g. Reye** Empennaoued lemm ar vabaned kevret gant goulfiñ an empenn ha steatoz paoterek an avu. Kirieget e vez div barenn arbennel, viruzel ha pistriell. An azoniad bevedel a c'hoarvez eus ul leiadur eus ar glukozwadvec'h hag eus an LPK, eus un akidoz kennevidel hag eus droazhketonegezh.
- Reynolds : syndrome de** ~ ◇ **Reynold's syndrome** ◇ **azoniad g. Reynolds** Kevreted ur c'hirroze bestlel kentael hag ur skleroderma.

RFLP ◇ **RFLP, Restriction Fragment Length Polymorphism** ◇ **LMTA, liesneuziadegezh ment an tammadoù argrennañ** Diwar-bouez un hilsont e c'hounezur tammadoù DNA a lies ment Polymorphisme de taille des fragments de restriction : Propriété qu'a l'ADN de différents allèles de générer des fragments de restriction de taille variable. Restriction : Mécanisme par lequel une cellule dégrade un ADN étranger.

Rh : **facteur** ~ ◇ **Rh factor** ◇ **parenn b. Rh** Ar parennoù-se zo bezant war c'horre ar c'helligoù ruz. Mar bezont dinoet war ruzkelligoù un hinienn, e vez lavaret ez eo "Rhesus (Rh) muiel". Ma ne anadont ket war ar c'helligoù ruz, e lavarer ez eo "Rhesus (Rh) leiel". Un digempad etre parenn Rh un danvez mamm hag he c'hrouell zo en ervez da zevoudañ kudennoù grevus. Gard eo ur venev Rhesus leiel hag he c'hrouell Rhesus muiel, ne vez peurliesañ kudenn ebet da geñver ar vechiegi gentañ. Hogen e-doug un eil brazded, emañ bevedeg ar vamm en ervez da ziorren antikorfoù a-enep ar gwad Rh+. Da heul e tinaou *kleñved gwadloezadel an nevezc'hanidi*.

rH ◇ **rH** ◇ **rH** (Teskanv Sz. *reducing intensity or reducing power of hydrogen*) Arventenn o kevaraezñ naouiñ stad oksidatur ur reizhiad. barr oksidañ-diren ur c'horf, eleze an derez krafusted anezhañ evit an oksigen. Dewerzhañ a reer an rH dre araезд logarithm eus gin gwask darnel an H₂ (en atm) e kempouez gant ar reizhiad redoks en dour : $rH = -\log_{10} PH_2$. Evit $PH_2 = 1$ atm, $rH = 0$. Ar gwask darnel-se eo a savel durc'hadur an dazgwered etreze an direadur pe an oksidatur.

rhabdomyolyse ◇ **rhabdomyolysis** ◇ **rabdomioliz g.** Loezadur ar gignenn rizennek. Devoudet e c'hell bezañ gant ur pored pe ur pistriad a-ser gant argrezadoù laurus an tolzennoù kaherel, gant troazhvioglobinegezh ha gant ur muiadur eus gwadvec'h an enzimoù kaherel (kreatin-fosfokinaz, aldolaz, laktikodezhidrogenaz). Stadet e vez e-doug kleñvedoù enzimateg 'zo.

rhabdomyome ◇ **rhabdomyoma** ◇ **rabdomiom g.** Miom gant gwad kaherel rizennek; yoc'henn dibaot kaer, en he unan pergen.

Rhabdoviridae ou **Rhabdoviridés** ◇ **Rhabdoviridae** ◇ **Rabovirideged l. (g.)** Kerentiad viruzoù gant RNA undigorvell, a vleinegezh leiel, a gemparzhegezh ulidek ha dezho ur golo obuzek. Mentoù ar virion zo 180 × 75 nm. Menegomp e-touez ar genad *Vesiculovirus*, viruz ar genaouf c'hwezigennek hag e-touez ar genad *Lyssavirus*, viruz ar gonnar, ha viruzoù kleñvedus all ivez, evit al loened hepken.

rhabdovirus ◇ **Rhabdovirus** ◇ **raboviruz g.** Viruz eus kerentiad ar Rabovirideged.

Rhadinovirus ◇ **Rhadinovirus** ◇ **Rhadinovirus g.** Genad viruzoù eus iskerentiad ar Gammaherpesvirineged, en o zouez an eror *Herpesvirus* denel.

Rhea Barton : **fracture de** ~ ◇ **Barton's fracture** ◇ **torr g. Barton** Torr penn izelañ ar gwerzhid, kevret gant un disvellad eus parzh adreñv ar c'harp, dezhañ neuz un torr.

rheumatogène ◇ **rheumatogenous** ◇ **rogien aa.** Devoudet gant ur rogad, evit al luc'hsae pergen.

rheobase ◇ **rheobasis** ◇ **leiaread g.** Read izekañ ur red tredan hirbad a gevaraez tizhout gwehin ar broud eus un nervenn, ur gignenn.

rhéologie ◇ **rheology** ◇ **beroniezh b.** Diskiblezh eus ar fizik a studi diver an danvez hag an distummadurioù o c'hoarvezout gant lies korf dindan wered an nerzhoù o c'hoari warno.

rhinalgie ◇ **rhinalgia** ◇ **friost b.** Laur lec'hiet er fri.

rhinencéphale ◇ **rhinencephalus** ◇ **fronempenn g.** Parzh a 'n empenn o kefleuniañ skiantenn ar c'hwesda. Evit a sell an den e c'hoarvez ar *f.* eus stirad ar c'hwesda hag eus lies furmadur (en o zouez reizhiad ar senklenn) loet e diaz pep hanterenn empenn.

rhinite ◇ **rhinitis** ◇ **frifo g.** Taniennadur lemm pe henek glaourgenn kavenn ar fri. — *f. henek usventus* (Gl. *rhinite chronique hypertrophique*) : seurtad frifo naoues dre usvent glaourgenn ar fri.

rhinodème ◇ **rhinoedema** ◇ **fric'houliv g.** Gouliñv glaourgenn ar fri arsellet gant ar c'houziviaded a ra un arver reñverek eus liaoù 'zo da enberadiñ er fri.

rhinogène ◇ **rhinogenous** ◇ **friien aa.** O tont eus ar fri pe kavenn ar fri.

rhinolalie ◇ **rhinolalia** ◇ **frivouezh g.** Strafuilh ar mouezhparañ devoudet gant daskemmoù dasonerezh ar c'havennoù fri. — 1° *f. digor*. Daskemm ar vouezh diwar heforzhded ar c'havennoù fri (seizi, treloezadur ar stavn askornek pe gouel ar stavn, h.a.) : ar mouezhiennoù genaouel zo dezho un hangren friel. — 2° *f. serr*. Daskemm ar vouezh devoudet gant steuzidigezh heforzhded ar c'havennoù fri ; mard emañ sezet ar skoilh a-zidreñv, ne c'hell ket mui ar c'hlañvour ec'hodiñ ar mouezhiennoù friel ; e gwir e komz dre ar genoù (*genaouvouezh*) ; mard emañ sezet ar skoilh er parzh arak ar c'havennoù fri, ez eus reñverioù dason monklus (*mouezh Polikinello*).

rhinolithe ◇ **rhinolith** ◇ **frivaen g. -vein** Grouan kavennoù ar fri.

rhinologie ◇ **rhinology** ◇ **friouriezh b.** Diskiblezh vezegel o plediñ gant ar fri, kavennoù ar fri ha gant an naouedoù a zo piaouel dezho.

rhinomanométrie ◇ **rhinomanometry** ◇ **friwaskventerezh g., friwaskventañ** Muzul ar gwask er fri. Emañ en ervez da vezañ *oberiat* (da-geñver an analerezh) pe *gouzañvat* (e-doug ar paouez analañ, gant enc'hwezadur ur red aer arstalek en ur fron) hag, hervez an hentenn hag an ardivinkoù arveret, en arak pe en adreñv.

rhinométrie ◇ **rhinometry** ◇ **friventañ, friventerezh g.** Muzul derez heforzhusted kavennoù ar fri evit a sell an aer.

rhinomycose ◇ **rhinomycosis** ◇ **frivikoz g.** Naoued kavennoù ar fri devoudet gant foue, eus ar genad *Candida* ar peurliesañ.

- rhinopharyngite** ◇ **rhinopharyngitis** ◇ **fric'hargadennfo** g. Tanijennadur ar fric'hargadenn.
- rhinophycomycose** ◇ **rhinophycomycosis** ◇ **frifikomikoz** g. Fikomikoz sezet er gwiadou endan-groc'hen eus ar fri, an divweuz hag an dremm.
- rhinophyma** ◇ **rhinophyma** ◇ **rinofima** g. Stad arbadet kenan a akne livrin usteñvus eus ar fri, gant koeñvennoù disneuzius ruzvok, strewet warno burbuennoù akne, kleizennoù ha frankadurioù korrwazhied.
- rhinoplastie** ◇ **rhinoplasty** ◇ **friatelviñ** Surjianerezh dereizhañ an disneuziadurioù ganedigel pe surjianerezh dazluniañ goude un anaf daraezel.
- rhinorragie** ◇ **rhinorrhagia** ◇ **fronwadañ** Gwadliñv ar fri (sl. *épi-staxis*).
- rhinorrhaphie** ◇ **rhinorrhaphy** ◇ **frondlita** Krafaelañ brielloù ur gouli a 'r fri.
- rhinorrhée** ◇ **rhinorrhea** ◇ **friver** g., **frinaouez** b. Dournaouez ar fri, anezhi usvorc'hañ glaourgenn kavenn ar fri.
- rhinosalpingite** ◇ **rhinosalpingitis** ◇ **frigorzennfo** g. Tanijennadur glaourgenn ar fri ha, war un dro, glaourgenn ar gorzenn glevedel.
- rhinosclérome** ◇ **rhinoscleroma** ◇ **frisklerom** g. Pore henek diwar *Klebsiella rhinoscleromatis*, naouus dre ur c'hoevadur eus glaourgenn ar fri hag ar fric'hargadenn, ha goude eus amwiskadoù ar fri, an divfron hag ar weuz krec'h ha dre maeloù henek gant ensiladurioù sklerozus hag argreskus eus glaourgennou an aerforzhioù uhelañ.
- rhinoscopie** ◇ **rhinoscopy** ◇ **friselliñ** Arselliñ kavenn ar fri, pe dre ar fronoù diwar-bouez ur spekulom friel (friselliñ araok), pe diwar-bouez ur melezourig ebarzhet er genoù a-dreñv gouel ar stavn oc'h adskediñ skeudenn ar fric'hargadenn hag ar founilhoù (friselliñ adreñv).
- rhinosporidiose** ◇ **rhinosporidiosis** ◇ **rinosporidiz** g. Mikoz ar broioù trovanel diwar *Rhinosporidium seeberi*, sezet peurliesañ er glaourgennou, er fric'hargadenn pergen (polipoù) hag er gevresae, en ervez da emastenn d'ar c'hroc'hen ha d'an eskern.
- rhinothermométrie** ◇ **rhinothermometry** ◇ **friwrezverkerezh** g. Muzul ar gwrezverk er fri.
- rhinotomie** ◇ **rhinotomy** ◇ **frienbenañ** Oberatadenn amkanet da zigeriñ frank speur araok kavenn ar fi, e sell da lamel ur yoc'henn.
- Rhinovirus** ◇ **Rhinovirus** ◇ **Rhinovirus** Genad viruzoù eus kerentiad ar Pikornavirideged, gwezherioù kiriek d'ar sifern gant an den. Ouzhpenn 110 serotip zo bet deskrevet.
- Rhipicephalus** ◇ **Rhipicephalus** ◇ **Rhipicephalus** Genad tarlask, en o zouez spesadoù 'zo, *Rh. annulatus*, *Rh. simus*, h.a., kiriek da dreuzkasadur lies pore d'al loened ha d'an den.
- rhizalyse** ◇ **root resorption** ◇ **rizaliz** g. Deloezadur gwrizennoù an dent, bonan (gwrizennoù an dent hegouez) pe kleñvedel.
- rhizarthrose** ◇ **root arthrosis** ◇ **artroz** g. **ar wrizienn**, **gwrizeniartroz** Artroz gwrizenienn ur biz (meud), ur biz troad, un ezel.
- rhizolyse** ◇ **rhizolysis** ◇ **rizoliz** g. Odead en ur wrizienn nervel, a orin surjaniel (gwrizennenbenañ) pe get.
- rhizomélique** ◇ **rhizomelic** ◇ **ezelwriziadel** aa. A-zivout gwrizennoù an izili.
- rhizomère** ◇ **rhizomere** ◇ **rizomer** g. Tiriad kroc'hen e diazalc'h ur gangrenn a-livenn hag ar gwrizennoù oc'h evodiñ diouti.
- Rhizopodes** ◇ **Rhizopoda** ◇ **Rizopod** s. Renkennad protozed rezvevat pe arvevat, gouest da ec'hodiñ astennoù heloc'h a reer mardreid anezho, a dalvez dezho da emzilec'hiañ. An amoeb, arvevaded an den, zo gougevret ouzh ar renkennad-se.
- rhizotomie** ◇ **rhizotomy** ◇ **gwrizennenbenañ** Skejañ surjaniel un pe lies gwrizenienn livennvelel.
- Rhodococcus equi** ◇ **Rhodococcus equi** ◇ **Rhodococcus equi** Spesad bakteri eus ar c'herentiad Mikobakteriakeged a c'hell bezañ kleñvedus gant an hangaeastaleg.
- rhomencéphalite** ◇ **rhomencephalitis** ◇ **dregempennfo** g. Tanijenn an dregempenn.
- rhomboïde** ◇ **rhomboïd** ◇ **karavek** aa. E stumm ul lankell. — Menegomp ar *c'higennoù karavek bras ha bihan*.
- rhonchopathie** ◇ **snoring disease** ◇ **anaez** g. **ar roc'hal**, **roc'hanaez** Ar roc'hal zo un trouz analadel devoudet dreist holl e-doug an analañ, o tarvezout e-pad an hun.
- rhotacisme** ◇ **rhotacism** ◇ **erfleañ** Kammzistagañ pe c'hwitañ distagañ al lizherenn r.
- rhumatisme** ◇ **rheumatism** ◇ **remm** g. Anv rumm dispis o taveiñ d'ur stroll anaезioù, lemm pe henek, a lies orin, dianav a-wechoù, o tizhout dreist holl ar c'henvelloù, a zo anazonoù pennañ anezho al laur hag an anhebleg.
- rhumatisme articulaire subaigu curable** ◇ **subacute rheumatism** ◇ **remm goulemm an arzoù pareadus** Naoued liesarzel dianc'horank, kuit a dizhad flugezel.
- rhumatisme blennorragique** ◇ **gonorrhéal rheumatism** ◇ **remm blennorragek** Remm poreel diwar ar gonokok.
- rhumatisme cardiaque évolutif** ◇ **evolutive rheumatic carditis** ◇ **remm dedroat ar galon** Enkalonenno, kalongaherfo pe amgalonenno remmien, rouestlad paot remm lemm an arzoù (sl. *Bouillaud : maladie de ~*).
- rhumatisme fibreux** ◇ **chronic secondary polyarthrit** ◇ **remm fibroz** Seurtad remm henek, o tont, gant an oadour yaouank, war-lerc'h ur barrad remm lemm a 'n arzoù; naouus eo dre zistummadurioù leteñvel ouzh re al liesarzo rumatoidel, diwar anafoù fibrozel troarzel, kuit a dizhad don eus an arzoù.

rhumatisme goutteux ◇ **gouty arthritis** ◇ **remm urlaouel** Seurtad remm, arzad diwar an urloù.

rhumatisme infectieux ou **pseudorhumatisme infectieux** ◇ **infectious arthritis, infective rheumatism** ◇ **gaouremm poreel** (sl. *pseudorhumatisme infectieux*).

rhumatisme neurotrophique du membre supérieur ◇ **hand-shoulder syndrome** ◇ **azoniad g. dorn-skoaz** ; **remm nervdeñvel an ezel krec'h** Azoniad o naouiñ dre reutadur laurus ar c'henvelloù eus unan pe, dibaotoc'h, eus an div vrec'h (an dorn hag ar skoaz pergen), gant dirazekadur an eskern hag un neuz gouliñvek, ha goude isteñvek ha sonnet, eus an dorn. Azou e vez an dedro. Delanket e c'hell bezañ gant un daraez leiek, ur wezhiadenn surjianeel bennak, bruskanaezioù 'zo (kevenkez kurunerel hag angwazhiad ar c'hahe kalon pergen) pe nervanaezioù, un artroz eus melloù ar gouzoug, al lies anaez-se o tarallañ, dre ar forzh damougel, nervaouadur simpatek ar vrec'h. Darvezout a ra ivez a-wechoù war-lerc'h mezegadurioù 'zo (bevastalerioù eneptorzhellek, fenobarbital, iod skinoberiek marteze) hag emledañ neuze d'an izili traoñ.

rhumatisme palindromique ◇ **palindromic rheumatism** ◇ **remm g. daradfeilh** Furm dibaot a remm, naouus dre arreadur dibenndermen eus resmiadoù arzfo ha troarzfio paot ha berrbad, kevret alies gant ozevnoù endermel hag endan-groc'hen. Dedreñ a reont hep terzhienn na anafoù skindinoadus ha ne zisoc'hont morse d'ar remm henek.

rhumatisme psoriasique ◇ **arthropathic psoriasis** ◇ **remm psoriasisek** Remm henek arsellet e-doug ar psoriazioz o tec'han pe furmoù lec'hiek, pe furmoù grevus dedroat.

rhumatoïde ◇ **rheumatoid** ◇ **rumatoïdel** aa. A-zivout laurioù leteñvel ouzh re ar remm.

rhumatologie ◇ **rheumatology** ◇ **remmouriezh** b. Rann eus ar vezekniezh o plediñ gant ar seurtoù liesseurt a remm.

rhumatologue ◇ **rheumatologist** ◇ **remmour** g. Arbennigour war ar remmouriezh.

rhume ◇ **cold** ◇ **sifern g., choberd g., anoued g.** Usvorc'h glaourgennoù an aerforzhioù uhelañ.

rhytidosis ◇ **rhytidosis** ◇ **ritidoziz** g. Anaez naouus dre vezañs lies roufenn groc'hen, o reiñ d'an oadour yaouank neuz un henad.

RIBA ◇ **Recombinant Immunoblot Assay** ◇ **RIBA** Prouad gwadveizel diazezet war an dazgwered etre un antigen dewerc'het dre hilouriezh, a lavarer askevosodat, hag un antikorf bezant er gwadveiz imbourc'het. Lakaet e vez war wel an disoc'h dre un dazgwered dre liv delanket dre zinoiñ enzimatek.

Ribbing : syndrome de ~ ◇ **Ribbing's syndrome** ◇ **azoniad g. Ribbing** Azoniad familhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, o c'hoarvezout eus ur skleroz a 'n drezenn o tizhout meur a askorn hir.

riboflavine ◇ **riboflavin** ◇ **riboflavin** g. Vitamin B₂, livegenn velen a ro d'ar gwipad e liv melen, dezhi ur roll bonel en argerzhioù oksidañ-diren ar c'helligoù, evel kedrann goell melen Warburg. Ar *r.* a vez kavet en edeier, an avu, ar c'hig, al legumaj, ar goell bier, h.a. An negez anezhañ a zevoud an *ariboflavinoz*.

ribonucléase ◇ **ribonuclease** ◇ **ribonukleaz** g. Enzim eus stroll an hidrolazoù o tasperzhiañ e dispenn ar molekul trenkenn ribonukleek (RNA).

ribonucléique : acide ~ (**ARN**) ◇ **ribonucleic acid, RNA** ◇ **trenkenn b. ribonukleek (RNA)** Keurvolekul polimer, dezhañ un arvevell troellennek hep mui a luniad leteñvel gant unan eus an daou arvevell oc'h amparañ an drenkenn dezoksiribonukleek (DNA). Ar c'hemm etre RNA ha DNA zo amsavadur ur sukr, an dezoksiriboz, gant unan all, ar riboz hag ur vazenn birimidek, an timin, gant unan all, an urakil. Kevaraezañ a ra enaoz protein ar c'helligoù hervez ar goulev enskrivet war an hilvoneg. — 1° An RNA kannad (mRNA) zo enaoz e kraoñell ar gellig dre berzh un enzim (RNA-polimeraz), diwar batrom unan eus an arvelloù a 'r molekul DNA : en un doare bennak ez eo eilad an arvevell-se (an treuzskrivadur). Da c'houde (al lankad treuzodiñ) ez a an mRNA er-maez eus ar graoñell evit mont da drezkas d'ar ribozom stlennad an hilvoneg kemeret war an arvevell DNA ha bennozh d'ar stlennad-se e vo diuzet ha trevnet an amindrenkennoù liesseurt a amparo ar molekul protein. Bennozh d'ar ribozom, an kez amindrenkennoù degaset gant an RNA treuzdoug (tRNA) zo lenet ouzh ar molekul RNA kannad (mRNA) e par e godonoù ketep. Ur wech echu arvevell an amindrenkennoù, a ampar ar molekul protein, ez emzistag eus an RNA kannad, eus ar ribozom hag eus an RNA treuzdoug. Goude bezañ talvezet da bleuskenn ez eo dispennet an RNA kannad hag adarveret e vo an elfennoù anezhañ evit enaozañ molekul all heñvel, amkanet da drezkas en-dro ar c'hemennad hilel eus ar c'hromozom d'ar ribozom. — 2° An RNA treuzdoug zo kefridiet da naouat ha da zegerc'hañ, dre unan eus e bennoù, un amindrenken en deus ul lenidigezh spesadek outi ha d'he zrezkas d'ar gemplezh ribozom-RNA kannad, ma len outi diwar-bouez ar penn all, e par ar c'hodonoù keñverek, o kevaraezañ evel-se savidigezh ar molekul protein. — 3° An NRA ribozomek (rRNA) zo ur gedrann vonel eus ar ribozom ma len ar protein.

ribonucléoprotéine ◇ **ribonucleoprotein** ◇ **ribonukleoprotein** g. Heteroprotein a zo ar stroll prostetek anezhañ an drenkenn ribonukleek.

ribose ◇ **ribose** ◇ **riboz** g. Pentoz o tasperzhiañ e kenaoz an nukleotidoù hag an trenkennoù nukleek.

ribosomal ◇ **ribosomal** ◇ **ribozomel** aa. A-zivout ar ribozom.

ribosome ◇ **ribosome** ◇ **ribozom** g. Rannig enkelligel war-dro 20 nm treuzkiz, niverus er rouedad endoplasmek hag er mitokondri. Dasperzhiañ a ra en enaoz ar proteinoù hervez ar stlennadoù treuzkaset gant an RNA kannad eilskrivet diwar an DNA. Amparet eo ar ribozomou gant proteinou ha trenkenn ribonukleek e kementadoù kevatal.

Ribot : loi de ~ ◇ **Ribot's rule** ◇ **savelenn b. Ribot** En atreñ kefredel e steuz da gentañ an eñvorioù nevesañ.

- ribotypage** ◇ **ribotyping** ◇ **riborisha** Eلفennerezh ar gen bonegus evit RNA ar ribozomou, arveret da hennadiñ ar skodoù garvevion.
- ribozyme** ◇ **ribozyme** ◇ **ribozim** g. Molekul RNA o vonediñ e-keñver an RNA evel un enzim.
- Richner-Hanhart : syndrome de** ~ ◇ **Richner-Hanhart syndrome** ◇ **azoniad** g. **Richner-Hanhart** Aneaz hêrezhel enkilek diwar un divig tirozin-aminotranferaz. Erzerc'hañ a ra dre un tirozinwadusvec'h, koc'honiadoù tirozin e gwiadoù ar c'hroc'hen (gant hiperkeratoz palv-sol) hag ar ferenn (ferennlug), kevredet gant un dilerc'hegezh vred ha savder.
- Richter : syndrome de** ~ ◇ **Richter's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Richter** Treuzfurmatur sarkomatus ar gwerblennoù e-doug al leukemiezh limfoidel henek.
- Rickettsiaceae** ◇ **Rickettsiaceae** ◇ **Rickettsiaceae** Kerentiad bakteri eus urzhad ar *Rickettsial* (anvet ivez *Rickettsi*). Arvevaded enkelligel, o c'hoarvezout eus ar genadoù *Coxiella*, *Rickettsia* ha *Rochalimaea*.
- Rickettsiales** ◇ **Rickettsiales** ◇ **Rickettsial** Urzhad bakteri o c'hoarvezout eus ar Rickettsiaceae hag an Anaplasmataceae.
- rickettsie** ◇ **rickettsia** ◇ **riketsi** s. Genad bakteri eus urzhad ar Rickettsial, kerentiad ar *Rickettsiaceae*, Gram leiel, liesneuz (kokheñvel, bazhigoù), dezho ur speurenn rizhek. Neriñ a reont er c'helligoù bev hepken (tiñvañ kelligoù, vioù rizhellek), er c'hitoplasm ar peurliesañ. Kleñvedus e vezont evit an den hag al loened, ez int treuzkaset dezho dre flemmad artropod poreet.
- rickettsiose** ◇ **rickettsiosis** ◇ **riketsioz** g. Nep pore diwar riketsi ha treuzkaset gant artropod (tarlask, akarianed, c'hwen, laou, h.a.), naouus dre derzhienn, un eksantem kroc'hen ha tizhadoù a 'r flugez.
- rickettsiose à tiques** ◇ **tick-borne rickettsiosis** ◇ **riketsioz diwar darlask** Anvad rumm o strollañ an terzhiennoù diwar darlask amerikan : terzhienn vouk ar Menezioù Roc'hellek, terzhienn vaelennek braziliat ha re ar Bed Kozh : terzhienn borbolennek morkreizat, terzhiennnoù diwar darlask siberiat hag aostrialiat.
- rickettsiose varicelliforme** ou **vésiculeuse** ◇ **riketsial pox** ◇ **riketsioz brech'nnijvanek** ; **riketsioz c'hwezigennek** Pore kuñv diwar *Rickettsia akari* ha naouus dre ur gwerblennaoued rannbarzhel, kridiennoù, terzhienn, un dispuilhad eilvedel d'ur grugenn deroù loet war lec'h flemmad an artropod *Allodermanyssus sanguineus*, arvevad al logod ti.
- rictus** ◇ **rictus** ◇ **skrign** g. Argrezañ an divweuz o reiñ d'ar genoù neuz ur mouse'hoarzh ginet, arsellet e-doug andagoù nerved 'zo.
- rideau : signe du** ~ ◇ ◇ **arouez b. ar rideoz** Arouez arsellet e degouezh seizi untu kigenn strishaer uhelañ ar c'hargadenn diwar anaf an nervenn deod-gargadenn. Da neuze, broudadur speur adreñv ar c'hargadenn a zelank an dilec'hiadur anezhi war-du an tu bonan ha war grec'h un tammig.
- Ridley : chorioretinite de** ~ ◇ ◇ **tolgennluc'hsaefo** g. **Ridley** Tizhad tolgennluc'hsaeel en onkokerkoz.
- Riedel-Tailhefer : maladie de** ~ ◇ **Riedel's thyroiditis** ◇ **kleñved** g. **Riedel-Tailhefer** Skoedenno fhenek anspesadel.
- Rieder : cellule de** ~ ◇ **Rieder's cell** ◇ **kellig** b. **Rieder** Kellig wenn a zo he c'hraoñell daou- pe lieshoskek. Arsellet e vez alies e-doug leukemiezhou lemm.
- Riegel : syndrome de** ~ ◇ **Riegel's syndrome** ◇ **azoniad** b. **Riegel** Seizi ar c'harloc'henn e-doug ar serridigezh plegoù ar vouezh (nesaat plegoù ar vouezh).
- Rieger : syndrome de** ~ ◇ **Rieger's syndrome** ◇ **azoniad** b. **Rieger** Naoued hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'h hek o kevrediñ kammneuziadoù kalonel, nerved ha lagadel.
- Riehl : mélanose de** ~ ◇ **Riehl's melanosis** ◇ **melanoz** g. **Riehl** Poikiloderma rouedek livegennek a 'n dremm hag a 'r gouzoug gant ar venev, a arbennelezh dianav.
- Rietti-Greppi-Micheli : syndrome de** ~ ◇ **Rietti-Greppi-Micheli syndrome** ◇ **azoniad** g. **Rietti-Greppi-Micheli** Furm leiek, allreek, ar moramwad, ma n'eus ket ur bec'h hemoglobin krouellel uhel.
- Rieux : hernie de** ~ ◇ **Rieux's hernia** ◇ **ogad** g. **Rieux** Ogad diabarzh ur c'hilbleg pervez en egor drek-sac'henn.
- rifamycine** ◇ **rifamycine** ◇ **rifamikin** g. Bevastaler goubaret diouzh tiñvadennoù *Streptomyces mediterranei*. Erskrivet e vez er poreadoù diwar stafillokok.
- rigidimétrie pénienne** ◇ **monitoring of penile rigidity** ◇ **andalañ reuter ar c'halc'h pe reudandalañ kalc'hel** Kalvezerezh imboure'h an dic'halloud revel gourevel a c'hoarvez a lerc'hwezañ diwar-bouez un ardivink — ar rigidimetr — argemmoù noz treuzkiz ha reuter ar c'halc'h
- rigidité pallidale** ◇ **pallidal rigidity** ◇ **reuter** g. **pallidel** (sl. *pallidal*).
- Riley-Day : syndrome de** ~ ◇ **Riley-Day syndrome** ◇ **azoniad** g. **Riley-Day** Aneaz familhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, arsellet dreist holl gant ar yuzevion achkenaz. Bez' ez eo un miemrenegezh kentael oc'h erzerc'hañ dre strafuilhoù gwazhiedloc'h-adel, un usc'hwez, un daeranvorc'h, strafuilhoù pervez ha gwask, a-wechoù resmiadoù terzhienn.
- Riley-Schwachman : syndrome de** ~ ◇ **Riley-Schwachman syndrome** ◇ **azoniad** g. **Riley-Schwachman** Kevredet direizhoù nerved hag askornel arsellet gant ar bugel : kerzhed reut, usdamoug, skuizhadusted vras, diouzh un tu, douester skinourel kresket e diaz ar c'hloppenn ha digresket en treuzennoù diouzh un tu all.
- rinçage pyélocaliciel : épreuve du** ~ ◇ **wash out** ◇ **proud** g. **ar riñsañ lestrkalirel** Proud embreget e-kerz un troazhluniñ engwazhiennel, pa vez reol al lestrlunad, evit erglask ur stenoz bezus eus un dalmerenn lounezh, kiriek d'un uswask talmerel.

Dewerc'het e vez dre zevoudañ un troazhusorc'h trumm ha puilh diwar-bouez an ensinkladur engwazhiennel, d'ar pemzekvet munud eus an troazhluniñ, pe eus 30 g urea dileizhet e 200-400 mL dileizhad kengrennek sall, pe eus un troazhusorc'her kreñv (furosemid). Mar bez bonan an div lounezha ez eo an div skeudenn a 'l lestr engwelc'het en ur ser ha steuziañ a reont, war ar skinkluniou lerc'h-ouzh-lerc'h, a-benn 8-12 min. Mar bez ur stenez eus un dalmerenn lounezha en ervez da zireizhañ arc'hwelioù al lounezha (dre leiadur ar silañ bloueigel ha muiadur an dassugañ dour hag Na), skinklunad lestr al lounezha drebad en tu-se, tra ma 'z eo steuziet en tu bonan.

Rinne : **épreuve de** ~ ◇ **Rinne's test** ◇ **prouad g. Rinne** Prouad arveret evit deznaou doareadel ur bouzarder. Dalc'het e vez un tonreizher, a bep eil, dirak ode diavaez ar c'hleved ha goude war ar vrennigenn. Ent reol ez eo berroc'h ar stenren askornel eget an hini aerel. E bouzarderioù ar skouarn greñv ez eo hiroc'h ar stenren askornel eget an hini aerel.

Riopelle : **tumeur de** ~ ◇ **Riopelle's tumour** ◇ **yoc'henn g. Riopelle** Yoc'henn al lounezha, o kevredañ hipernefrom, sarkom hag angioliopom.

risque ◇ **risk** ◇ **riskl g.** Tebegezh c'hoarvezadur un darvoud divastus. — **riskl dizave** (Gl. *risque absolu*, Sz. *absolute risk*). Tebegezh c'hoarvezadur un darvoud (da sk. : kurunerel) *hep daveiñ* d'ur boblañs a un oad hag a un rev dezho parenn riskl ebet. — **riskl keñverel** (Gl. *risque relatif*, Sz. *relative risk*). Prizadur ar *riskl* dre *geñveriañ* gant an kez poblañs. Kevaraezañ a ra kavout ar c'houziadiad dezho ur riskl muiet en un teskad savelet. — **dazhaenadur ar riskl** (Gl. *stratification du risque*, Sz. *risk stratification*). Daspazhañ e lies stroll ar c'houziadiad o kemer perzh en un teskad, hervez pouez parennoù grevusted hag elfennoù erdebiñ o anaezioù.

Risser : **test de** ~ ◇ **Risser's test** ◇ **prouad g. Risser** Andalañ gant ar c'hrennard, war ur skinklunad a-dal a 'l lestr, stad dedreñ kresk an eskern. Echu eo pa vez soutet ar poent askornaat ouzhpenn eus kribenn ar glun gant an kez askorn. Derezet eo ar prouad-se eus 0 (kent dinodadur ar c'hentañ poent, war-dro 13-14 vloaz gant ar merc'hed, 15-16 vloaz gant ar baotred) da 5 (kendeuzadur klok, tri bloaz war-lerc'h ar peurliesañ).

RIST ◇ **Radio-Immuno-Sorbent Test** ◇ **RIST** Prouad dezventañ an immunoglobulinoù E er gwadveiz, er c'hlevedoù atopek (astma, h.a.).

ristocétine ◇ **ristocetin** ◇ **ristoketin g.** Bevastaler goubaret diouzh tiñvadennoù *Nocardia lurida*, a zo al luniad hag ar gwerederezh anezhañ nes da re ar vankomikin, hep arver klinikel : devoudañ a ra dazadur ar pladanoù hag ar steuziadur anezho eus ar gwad amredat.

Ritchie : **indice de** ~ ◇ **Ritchie's index** ◇ **feuriader g. Ritchie** Trevnad feuriañ arveret e remmouriezh, diazezet war zerezh kreñvder al laurioù pa bouezer war ar c'henvelloù.

rituel conjuratoire ◇ **ritual** ◇ **hudjestroù l. (g.) argas, hudjestrall argas** Teskad jestroù a gred an darvoudidi bezañ rediet da arren evit sioulaat o skorpuloù, hervez un urzh divrall, kent reoù 'zo eus o oberoù, evit diogeliñ ar penn mat anezho.

Rivalta : **réaction de** ~ ◇ **Rivalta's reaction** ◇ **dazgwered g. Rivalta** Prouad o kevaraezañ digemmañ ar fennadoù foel diouzh ar re a orin treloc'hel : lezel a reer da gouezhañ un nebeut takennoù eus al levruzenn da imboursañ hiñ e-barzh dour strilh azdodet ennañ ul lommig trenkenn aketek ; leidek ez a al liñvenn pa vez kel eus un naouezenn ha boull e chom en degouezh kontrol (trenaouezenn). Dazgwered dispredet.

Rivero Carvallo : **signe de** ~ ◇ **Rivero Carvallo's sign** ◇ **arouez b. Rivero Carvallo** Arouez ur skorted tribroudek. Ar sourr sistolek el lech a vez kreñvoc'h pa astal ar c'hlañvour e anal en enanalañ don eget e-kerz ur paouez analañ dianec'hanael. Kevaraezañ a ra an arouez-se da zigemmañ sourr ar skorted tribroudek diouzh hini ar skorted vintrek, a chom digemm e-doug an embregadennoù-se.

riziforme ◇ **riziform** ◇ **rizheñvel aa.** A neuz heñvel ouzh greun riz.

Roberts : **syndrome de** ~ ◇ **Roberts's syndrome** ◇ **azoniad g. Roberts** Teskad kammneuziadoù kemplezh, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, gant krakadur eskern an izili, nes da hini ar grakezelegezh ha gant kammneuziadoù klopendremmel diseurt (enebrezh aront, daoulagad skaret, genoù ront, skarr daoudou er weuz, a-wechoù korrgloppenegzh pe kloppennish, kolobom).

Robin : **syndrome de Pierre** ~ ◇ **Pierre Robin's syndrome** ◇ **azoniad g. Pierre Robin** Kammneuziad dibaot o kevredañ un iswe gant dreklodur ar c'haved, ur skarr er stavn, un teodislink ha strafuilhoù analadel ; a-wechoù e vez kammneuziadoù kalon. Unan eus azonoù ar gentañ gwareg eo.

Robinson, Power et Kepler : **test de** ~ ◇ **Robinson, Power and Kepler test** ◇ **prouad g. Robinson, Power ha Kepler** Prouad da imboursañ hiñ ar gaenuslounezhezh gant ur gouzrec'h dindan c'housesell a skorted ; en degouezh-se e vez un dale ezvevennañ an dour.

Robles : **maladie de** ~ ◇ **Robles's disease** ◇ **kleñved g. Robles** Onkokerkoz lagadel (sl. *onchocercose*).

ROC : **courbe** ~ ◇ **ROC curve** ◇ **krommenn b. ROC** Teskanv ar Sz. *Receiver Operating Characteristic*, kevregad o terc'hennañ ar c'heñver etre kizidigezh ha spesadelezh ur prouad deznaouiñ evit gwerzhadoù diseurt arveret evel dezverkoù reolded. O tougen war ahel al ledennoù 1 lei ar spesadelezh (*gourzhspeadelezh*) ha war ahel an hedennoù ar gizidigezh e c'hounezer ur grommenn o titouriñ un disoc'h seul vastusoc'h ma pella diouzh an drezvegen.

Rochalimæa ◇ **Rochalimæa** ◇ **Rochalimæa** Genad bakteri eus kerentiad ar *Rickettsiaceae*, kiriek — a-douez reoù all — da gleñved a 'r skilfadou kizhier ha da derzhienn ar foziou brezel.

- rocher** ◇ **petrous part of the temporal bone** ◇ **lodenn** b. **garregenek** (pe **karregenn** b.) an **askorn ividig** Lodenn garregenek diabarzh an askorn ividig e stumm ur c'herndaleg pevarc'hognek, ma emañ kavennañ ar skouarn diabarzh.
- Roesler** : **signe de** ~ ◇ **Roesler's sign** ◇ **arouez** b. **Roesler** Askouñ sezet war ribloù diabarzh ar c'hostoù, hewel war skinlunioù ar glañvourion tizhet gant isvoll ganediged strizh an aortenn. Devoudet int gant graspadur an askorn gant an talmerennañ etre-kostoù usvollek a savel un amred kengostezel etre ar rannoù en argrec'h pe en ardrañ isvoll an aortenn (sl. *coarctation*).
- Roger** : **maladie de** ~ ◇ **Roger's disease** ◇ **kleñved** g. **Roger** Kehentad etre-kofigoù ganediged a vent vihan.
- Roger** : **souffle de** ~ ◇ **Roger's murmur** ◇ **sourr** g. **Roger** Sourr garv holostolek gant ur c'hreñvder uc'hek e par an trede tachad etre-kostoù kleiz, o saezhenniñ ent emprennek, arouez ur c'hehentad etre-kofigoù.
- Rohr** : **agranulocytose hyperplasique du type ou moelle de** ~ ◇ **Rohr's agranulocytosis** ◇ **agranulokitoz** g. **Rohr** ; **mel** g. **Rohr** Seurtad agranulokitoz ma anad er mel un erwezhus usweüs, o c'hoarvezout eus furmoù yaouank hepken (promielokit ha mielokit). Grevus e ve, hep kas d'ar marv bewech.
- Rokitansky-Ferichs** : **maladie de** ~ ◇ **Rokitansky's disease** ◇ **kleñved** g. **Rokitansky-Ferichs** Furm glasel grevus a avufo lemm; isvent melen lemm an avu, avufo rurek.
- Rokitansky-Küster** : **syndrome de** ~ ◇ **Rokitansky-Küster-Hauser syndrome** ◇ **azoniad** g. **Rokitansky-Küster** Ezzevañs ar gouin hag an darn vrasañ eus ar grozh da heul angwe an div drederenn izelañ eus ar sanioù lez-krennlouezh.
- rolandique** : **syndrome** ~ ◇ **rolandic syndrome** ◇ **azoniad** g. **rolandek** Teskad erzerc'hadoù diwar dizhad rannbarzhioù ar bluskenn empenn nes d'an nant a-nen.
- Rolando** : **scissure de** ~ ◇ **central sulcus of the cerebrum** ◇ **nant** g. **a-nen** Nant don loet war dalbenn grec'h ha kostezel an hanterenn empenn, o tispartiñ tolbezenn an tal diouzh tolbezenn ar gitern.
- Romano-Ward** : **syndrome de** ~ ◇ **Romano-Ward syndrome** ◇ **azoniad** g. **Romano-Ward** Anaez hêrezhel dibaot, treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, naouus dreist holl, er c'halonvarrwevad, dre uspad an esaou QT, kevredet a-wechoù gant ezreolderioù ar gwagennoù T, gant ur c'halonistead, ur migorvez kentezel, ur broudalf amdeat pe un ispad eus an esaou PR. Erzerc'hañ a ra ent klinikel dre ezwalioù arreat, devoudet gant migorveziou kofiged (dreistsistolioù, barradoù krehadoù pe gweadennoù pikoù). Echuiñ a ra alies dre ar marv trumm. N'eus, en anaez-se, bouzarded ebet evel en azoniad Jervell ha Lange-Nielsen.
- Romberg** : **épreuve de** ~ ◇ **Romberg's test** ◇ **prouad** g. **Romberg** Prouad arveret evit studiañ ar c'hempouez diasavel. Goulenn a reer ouzh ar c'houzviad d'emzerc'hel war sav, an treid a-stok, ar penn a-zerc'h hag an daoulagad serr, tra m'emañ an arseller o klask ur gwariadur, mard eus.
- Romberg** : **maladie de** ~ ◇ **Romberg's disease** ◇ **kleñved** g. **Romberg** Anaez o naouiñ dre isteñv argammedek, o teraouiñ er bugelvezh, eus holl wiadoù un hanterenn eus an dremm. Dianav eo an orin anezhañ; ur seurtad mizlid e ve.
- Romberg** : **signe de** ~ ◇ **Romberg's sign** ◇ **arouez** b. **Romberg** Evit an tabezeg, dic'halluster da virout al loadur war sav, an treid a-stok hag an daoulagad serr, oc'h azonañ tizhad an doneraezñ.
- ronchus** ou **râle ronflant** ~ ◇ **rhonchus, sonorous rale** ◇ **ronk** g. **roc'hvanek** Ronk sec'h, boud an doniezh anezhañ, o tennañ da roc'h un den o kousket, oc'h erzerc'haat bezañs borc'hadennoù glaourek er bronkez.
- ronflement** ◇ **snoring** ◇ **roc'hal** Analerezh stenek o c'hoarvezout e-doug an hun, devoudet gant froumoù ar ouel stavn.
- röntgen** ◇ **röntgen** ◇ **rontgen** g. Unanenn ardizh ouzh skinadoù X pe γ , kevatal da 2, 58.10⁻⁴ koulomb dre gigogramm. Arouez : R.
- röntgenisation, röntgenoscopie, röntgentherapie** ◇ ◇ **sl.skinata X, skinselliñ, skingurañ.**
- Rood** : **méthode de** ~ ◇ **Rood's method** ◇ **hentenn** b. **Rood** Kalvezder addiorren an nammidi loc'hadel a-empenn o c'hoarvezout a aesaat ar fiñvadoù oberiat dre vroudadoù diavaez.
- ROR** ◇ **MMR** : **Measles, Mumps, Rubella** ◇ **RJR** : **enepruzell, enepjotorell, enepruzig** Vaksin kevredet enepruzell, enepjotorell hag enepruzig.
- Rorschach** : **test de** ~ ◇ **Rorschach's test** ◇ **prouad** g. **Rorschach** Prouad ervannañ o kevaraezañ studiañ luniad ar berson-elezh. Arverañ a reer dek taolenn warno takadoù du pe livek, erouezet d'ar gouzrec'h hervez un urzh savelet, evit ma teskrivfe ar pezh a zec'h halvont evitañ.
- Rosai et Dorfman** : **maladie ou syndrome de** ~ ◇ **Rosai and Dorfman syndrome** ◇ **azoniad** pe **kleñved Rosai ha Dorfman** Seurtad retikuloendotelioz eilvedel d'un anaez viruzel, war a hañval, o tarvezout gant ar bugel e bezañs c'hwarrennoù liesek o tedreñ etrezek ar pare.
- Rose** : **position de** ~ ◇ **Rose's position** ◇ **loadur** g. **Rose** Gourvez a-gein gant ar penn a-spilh e-maez ribl an daol oberata. Arveret e vez al loadur-se e gwezhiadennoù 'zo embreget war an aerforzhioù.
- Rose** : **tétanos céphalique ou hydrophobique de** ~ ◇ **Rose's tetanus, cephalic tetanus** ◇ **tetanoz ar penn** g. **Rose** pe **tetanoz dougazel** **Rose** Tetanoz devoudet gant ur goul e dremm, naouus dre argrezadoù kigennoù ar rannbarzh dremm-gouzoug, ar c'hargadenn hag an tarzh, o tevoudañ an dougazel dre c'henglav ha dre sezi an dremm loet diouzh tu ar gouli.
- rose Bengale** : **épreuve du** ~ ◇ **rose bengal test** ◇ **prouad** g. **ar roz Bengal** I Prouad amkanet da imboure'hiñ arc'hwel livec'holañ a 'n avu, dre studiañ ar mod ezvevennañ a 'n avu eus ul livuzenn — ar roz Bengal — ensinklet e gwazhiennañ ar

gouzrec'h. A-benn 45 munud e kevaraez imbourc'h livventerezhel ar gwad andalañ bec'h al livuzenn o chom en amred. Ent reol e vez izel ar bec'h-se, dindan 3; uheloc'h e vez gant an avuadeion, eus 3 da 9. Ur bec'h brasoc'h eget 9 a erzerc'ha ur miezvevennañ grevus (tizhad an avu pe azdalc'h bestl). Dispredet eo bremañ ar proudad-se. 2 (Bakteriouriezh) Dazgwered dazgludañ o kevaraezañ deznaouiñ hag eveshaat ar brukelloz.

rose Bengale : **test de la coloration au** ~◇ **rose bengal staining test** ◇ **proud livadur dre ar roz Bengal** Proud arveret evit deznaouiñ kleñved Sjôgren. Enberañ a reer el lagad un dileizhenn roz Bengal a liv a-ziuz kelligoù ar gevresae hag ar gornsae anafet gant ar c'hleñved.

Rosenbach : **test de** ~◇ **Rosenbach's test** ◇ **proud Rosenbach** Dezventerezh ar blasmahemoglobinegezh a-raok ha goude soubañ un dorn en dour yen e-pad 5 munud; e degouezh a droazhhehoglobinegezh c'hrezvarek diwar ar yenion ez eo ar werzhad vuzuliet goude yenadur brasoc'h eget an hini c'hounezet a-raok ar soubidigezh.

Rosenthal : **maladie de** ~◇ **Rosenthal's syndrome** ◇ **kleñved g. Rosenthal** Anvet ivez *hemofiliezh C*, anaez gwadliñvel hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek. Diforc'h eo diouzh an hemofiliezh dre c'hougelled an azoniad gwadliñvel hag, alies, ezvezañs a arzwadad. Devoudet eo gant ezvezañs er plasma eus ar barenn Rosenthal (parenn XI), unan eus ar parennoù protromboplastek plasmatek.

Rosenthal-Kloepfer : **syndrome de** ~◇ **Rosenthal-Kloepfer syndrome** ◇ **azoniad g. Rosenthal-Kloepfer** Azoniad naous dre gevreted leukomou daoudu o temeraat ar c'hornsaeoù, un neuz keurvleñchek a 'n dremm gant bosou tev a 'n tal ha plegoù kroc'hen tev a 'n dremm hag a 'r vrigenn.

roséole ◇ **roseola** ◇ **rozig g. -où** Dispuilhad kroc'hen a vrizhennoù roz, ront pe vigelc'hiek, a orinoù liesseurt (sifiliz, tifoid, terzhiennoù dispuilhadel, pistriadiurioù, from).

Roseolovirus ◇ **Roseolovirus** ◇ **Roseolovirus** Genad viruz eus kerentiad an *Herpesviridae* a zo ar spesad *Herpesvirus* 6 kiriek d'an eksantem trumm pe rozig mabanel pe c'hwec'hvet kleñved (sl. *sixième maladie, roséole infantile*).

Roser-Braun : **signe de** ~◇ **Roser-Braun sign** ◇ **arouez b. Roser-Braun** Ezvezañs a boulzadoù eus ar bilhonenn dev, stadet e-doug an trepanañ, e degouezh a bugnez empen.

rosette ◇ **rosette** ◇ **rodig b. -où** Lun furmet dre c'hlenadur kelligoù, hemati ar peurliesañ, en dro d'ur gellig all, ul limfokitenn d'al liesañ, diwar vuzerioù dibarek kevaraezus d'ar glenadur-se.

rosette rhumatoïde ◇ **rheumatoid rosette** ◇ **rodig rumatoidel** Lun gounezet dre galvezder ar rodigoù, dedalvezet da imbourc'hiñ al liesarzo rumatoidel. Limfokitennoù a 'r c'hlañvour a lakaer e kendiraez hemati kizidikaet gant immunoglobulinou konikl. Al lunioù e stumm rodigoù a anad pa vez resmiadoù laurus.

rosettes : **phénomène ou technique des** ~ ◇ **rosette formation** ◇ **anadenn ar rodigoù pe kalvezder ar rodigoù** Kalvezder o kevaraezañ lakaet war wel paradur antikorfoù e par ar c'helligoù ouzh o borc'hañ (kelligoù limfoidel : immunokit). An kez kelligoù o vezañ lakaet e diraez an antigen, zo hangaet outo ar gouzrec'h, en dazglud. Pa vez luniek an antigen (kelligoù ruz, da skouer) ez emstal e kurunenn en dro d'ar c'helligoù borc'her antikorfoù. Al lunioù-se e rodigoù zo spesadek eus an antikorfor studiet : ne anadont nemet e diraez an antigen keñverek. — Gant an den, daou zoare eus kalvezder ar rodigoù a gevaraez diforc'hañ an daou seurt limfokit : 1° *hini ar rodigoù emdarzh* a ro tu da hennañ al limfokit T o tazgludañ en dro dezho, hep hangaeadur a-rakwez, ar c'helligoù ruz deñved; pa vez herrek tre an dazgwered e vez graet anezhañ *rodig E oberiat*; 2° kalvezder ar *rodigoù hangaeel* a zezverk a-ziuz al limfokit B a c'hronn en dro dezho ur gurunenn a gelligoù ruz allevek goloet gant antikorfoù antieritrokrit ha gant klokaenn : evit gwir, al limfokit B zo warno ur buzer en arez da lenañ kedrann C3 ar glokaenn.

rosettes : **test d'inhibition des** ~ ◇ **inhibition of rosette formation** ◇ **proud heudañ furmadur ar rodigoù** Proud o kevaraezañ gwiriañ hangaeastalusted ur gwadveiz antilimfokit (pe hangaeastalerioù all). Ar gwadveiz-se, mesket gant limfokit hangaet a-rakwez ouzh kelligoù ruz 'zo, a lam o barregezh, pa vezont lakaet goude e diraez ar c'helligoù ruz-se, da vorc'hañ en o enep an antikorfoù ha d'o dazgludañ e rodigoù.

Rosewater : **syndrome de** ~ ◇ **Rosewater syndrome** ◇ **azoniad g. Rosewater** Isganadegezh gourevel dianav e arbenn.

Ross : **opération de** ~ ◇ **Ross procedure** or **pulmonary autograft** ◇ **oberatadenn b. Ross** Unanimboudañ an trapig skeventel e-lec'h an trapig aortek. Evit an trapig skeventel zo amsavet gant un unspeadimboud.

Rossano : **optotype des** ~ ◇ **Rossano optotype** ◇ **gwelrzhenn b. Rossano** Skeul lemmded weled o c'hoarvezout eus loened pe ergorennoù, en erdu d'ar vugale vihan.

Rossier : **syndrome de** ~ ◇ **azoniad g. Rossier** Kevreted gant ar rakkoulzeg eizhañ eus lec'h gant askornad liestorr, eus ikter ha skeventad grevus a-ser gant barradoù harzanal.

rossignol des tanneurs ◇ **tanner's disease** ◇ **darouedenn b. ar givijerion** Klisiadennoù laurus kenan war ar bizied diwar euzennoù arveret gant ar givijerion, damheñvel ouzh lagad un dube.

Rossolimo : **réflexe ou signe de** ~ ◇ **Rossolimo's reflex** ◇ **bondoug g. pe arouez b. Rossolimo** 1 Plegad ar bizied treid devoudet gant kiziata an talbenn solel anezho, gant ar glañvourion tizhet gant un anaf eus an hordenn bikermennek. 2 Plegad damougek bizied an dorn (ar meud ivez) devoudet gant kiziata ar c'hreizdorn palvel e diaz ar biz yod hag ar biz kreiz. Erzerc'haat a rafe un daralladur eus an hordenn bikermennek.

rotation du cœur ◇ ◇ **c'hwelad g. ar galon** Fiñv ar galon a c'hwel en dro da unan eus an tri ahel anezhi : diasaezh, diadreuz pe diahed.

rotatoire : bruit ~ ◇ muscle sound ◇ sourr g. ar c'higennoù (sl. *murmure rotatoire* ou *musculaire*).

rotatoire : épreuve ~ ◇ rotation test ◇ proud g. c'hwelañ Proud amkanet da lakaat war wel ur strafuilh a 'r c'hempouez (anaf ar milendall). Ur gouzrec'h, en e goazez serr e zaoulagad ha sonn e benn war ur gador arbennik, a anad gantañ ent reol, goude bezañ c'hwelet buan warnañ e unan un dek gwech bennak, ur gwariadur eus ahel ar c'horf hag un nistagmuz padek durc'haet diouzh tu ar c'hwelañ. Ezvezant eo an damoug-se pa vez distrujet ar milendall.

Rotavirus ◇ *Rotavirus* ◇ *Rotavirus* Genad viruzoù gant RNA daouarrevell, a gemparzhegezh diñsek, hep golo, etre 60 ha 75 nm hed, e stumm ur rod, eus kerentiad ar *Reoviridae* ha kiriek da zarc'hoaladoù 'zo a 'r vagadell hag a-wechoù da boreadoù analadel.

Roth : rétinite septique de ~ ◇ Roth's septic retinitis ◇ luc'hsaefo g. lestel Roth Luc'hsaefo korrenfraouel o tarvout e-doug ar stadoù gwadlestegezh, ent dibarek an enkalonennfo poreel. Naouiñ a ra dre vezañ war al luc'hsae eus lies annon gwadliñvel dezho ur greizenn wenn (takadoù Roth), steuzidik hag adfeillus.

Rothia ◇ *Rothia* ◇ *Rothia* Genad bazhilli anaerat anret Gram+ a zo bet lakaet da giriek da *gleiñved a 'r skilfadoù kizhier*. E gwir, an kez naoued a ve devoudet gant bakteri all.

Rothmann-Makai : syndrome ou panniculite de ~ ◇ Rothmann-Makai syndrome ◇ azoniad g. Rothmann-Makai pe golc'hedanfo g. Rothmann-Makai Seurtad golc'hedanfo ozvennel o tarvout gant ar bugel yaouank, naouus dre un niver bras a ozvennoù kempazhek, laurus a-wechoù, a neuz amfoel hag o tedreiñ herrek pe herrekoc'h etrezek ar pare.

Rothmund-Thomson : syndrome de ~ ◇ Rothmund-Thomson syndrome ◇ azoniad g. Rothmund-Thomson Aneaz tiegezhel, hêrezhel, treuzkaset er mod enkilek aotozomek, naouus dre gevreted ur skleroderma a 'n dremm, a 'n daouarn hag a 'n treid, o teraouiñ eus 4 da 5 miz goude ar c'handedigezh, kevret gant livegadoù, korrwazhiedusvolloù, poikiloderma hag alies gant gouliezoù laurus; gant ur ferennlug a-gaenenn daoudo, o tinodiñ etre 4 ha 7 vloaz, hag o tedreiñ herrek; gant strafuilhoù garloc'hennel (mouezh raouliet pe mouezh penn — *falsetto*); alies gant un neuz tizogvanek.

Rotor, Manahan et Florentin : syndrome de ~ ◇ Rotor's syndrome ◇ azoniad g. Rotor, Manahan ha Florentin Aneaz dibaot kaer, treuzkaset hervez ar mod aotozomek enkilek, nes da gleiñved Dubin-Johnson, naouus dre un ikter amzoues, liesneuz, a zedro henek, hep daralladur a 'r stad hollek. Nebeut uhel eo bec'h ar bilirubin, a rizh kemmesk (eeun pe ameeun); a-wechoù ez anad ur gwadloezañ amgreñv hag e vez, en troazh, livegennoù ha, gwezh a vez, haliou bestle. Kuit a steviadur eo ar forzhioù bestl; n'eus tizhad ebet eus an arc'hwelioù avuel na livegadur ebet eus an avu. Devoudet eo an naoued-se gant ur midigorzh eus ar bilirubin kevelet diwar ezvezañ un enzim avuel (transferaz).

rotule : clonus, danse ou phénomène de la ~ ◇ patella clonus ◇ gougrid g. pe brac'hitell b. pe anadenn b. ar padelleg Anadenn letañvel ouzh *gougrid an troad*, oc'h erzerc'haat an un anaf. He dec'h an a reer o c'houlankañ d'ar padelleg ur fiñv a-daol eus an nec'h d'an traoñ, diwar-bouez ar bizied arloet ouzh ar riblennoù (ar c'har o vezañ war astenn); c'hoarvezout a ra neuze un heuliad luskelladoù gant ar padelleg.

rotulien ◇ *patellar* ◇ ar padelleg A-zave d'ar padelleg. (sl. *choc rotulien*; *réflexe rotulien*, *réflexe patellaire*; *fémoro-patellaire* : *syndrome* ~, *syndrome rotulien*).

roue dentée : phénomène de la ~ ◇ cogwheel rigidity ◇ anadenn b. a 'n dentrod E kleiñved Parkinson, merzhout, da geñver defiñval gouzañvat ur c'henvell, un heuliad diskrogoù berrbad letañvel ouzh ar santad dec'haret gant c'hwel un dentrod.

rouge Congo : épreuve du ~ ◇ Congo red test ◇ proud g. ar ruz Kongo Ensinklañ engwazhiennel eus ruz Kongo. Gant ar gouzrec'h bonan, a-benn un eurvezh hanter, e vez adkavet c'hoazh er gwad ouzhpenn 70 % eus al livuzenn ensinklet. Mard eo tizhet ar gouzrec'h gant an amiloz e steuz al livuzenn kalz buanoc'h hag ezvezant eo en troazh; bez' e ve lenet gant an danvezenn amiloidel. Kleiñvedoù ar c'hollagen hag anaezioù 'zo al lounezh a ya ivez a-ser gant leiadur herrek gwadvec'h ar ruz Kongo. Dispredet eo aet ar proud-se.

rougeole ◇ *measles* ◇ ruzell b. Pore dispuilhat, tredizhus kenan ha darreuziadek, paot gant ar vugale pergen, diwar ur viruz eus kerentiad ar *Paramyxoviridae* a 'r genad *Morbillivirus* (viruz ruzelle). Ar gounervezh a bad war-dro 10 devezh. Un nebeut devezhioù a-raok an dispuilhad kroc'hen ez anad ur maeloù fri-lagad terzhiennek, gant bezañ war dalbenn diabarzh an divvoc'h eus pikoù gwenn balirek (arouez Koplik). Deraouiñ a ra gant an dremm hag emastenn d'ar c'horf en e bezh ha d'an izili; c'hoarvezout a ra eus krugennoù bihan ruz balirek un disterañ, o taskantañ mui pe vui e plakadoù, hag o lezel bepred etrezo entremezioù kroc'hen bonan. Rouestladoù ar ruzell a vez a urzh analadel dreist holl. Muiek ez int gant ar vugale mivaget pergen, en Afrika peurgetket.

rouget ◇ *chigger* ◇ gwrec'h g. -ent Eost pe mederig g. -ed Anvioù boutin roet da nimfenn eizhtroadek *Trombicula autumnalis*. Ruz he liv e trig evel arvevad war al loened bihan hag an den, he flemmadennoù o tevoudañ dezhañ debron feuls gant eritem hag a-wechoù terzhien vihan (sl. *fièvre fluviale du Japon*).

Rouget : loi de ~ ◇ savelenn b. Rouget An nervennoù gwazhiedfrankaat ne ziraezont nepred an organoù ma tibennont, hep tremen dre gelligoù kangrennel.

rouget du porc ◇ *swine erysipelas* ◇ terzhien b. ruz ar moc'h Kleiñved tredizhus diwar ur garvev spesadel (*Erysipelothrix rhusopathiae* pe *Bacillus erysipelatus suis*), o tevoudañ milzarreuziadoù grevus gant ar moc'h. Enkoradus eo d'an den, o vezañ arsellet ent nemedennek gantañ. Kemer a ra neuze pe ar furn lec'hiek (sl. *erizipeloid*), pe ar furn hollek gant plakennoù bras eritematus, pe, dibaot a wech, ar furn gwadlestel. A-wechoù ez eo ur c'hleñved micherel (sl. *érysipéloïde*).

roulement ◇ **rolling** ◇ **ruilhal** Kalvezder leuñviñ, anezhañ definañ kigennoù un ezel dalc'het gant an daou zorn en dro da dreuzenn an askorn kefin.

roulement à bille : **manceuvre** ou **signe du ~** ◇ ◇ **kefleuñvad** g. pe **arouz** b. ar **c'hud-ruilh** Kefleuñvad evit lakaat war wel bevennadur c'hweladur an askorn morzhed e remm henek al lez (lezartroz). Ar c'hlañvour o vezañ er rakgourvez, pleget a-skouer e c'har, a-zerc'h, a erwez en un doare nebeutoc'h frank ouzh ar finvoù bolodiñ diadrez skañv goulanket gant ar mezeg.

roulement diastolique ◇ **diastolic rumble** ◇ **fraoñv** g. **diastole** Trouz fraoñvus a c'hoarvez e-doug diastol ar galon hag a gendalc'h gant ar sourr raksistolel, en isvoll mintrek.

Roux : **opérations de ~** ◇ **Roux' operations** ◇ **oberatadennoù Roux** 1 Ezvenañ an teod goude skejadur ar c'haved el linenn greizer. 2 Dasforzhañ kreuz-yunegenn e Y, dre skarvañ penn pellek ar yunegenn ouzh ar stomok, goude bezañ skejet ar pervez, heuliet gant un dasforzhañ yunegenn-yunegenn en ardraoñ. 3 Prederiadur surjaniel disvelladoù adfeilhus ar padellek, anezhañ distagañ stirenn ar padellek eus torosenn arak ar skin ha reiñ dezhañ an enlevna diabarshoc'h (arver dibaot).

Roux : **signe de ~** ◇ **Roux sign** ◇ **arouz** b. **Roux** Pukadur an trovaleg bras arsellet diouzh an tu tizhet, e torrou al lestr.

Rovsing : **signe de ~** ◇ **Rovsing's sign** ◇ **arouz** b. **Rovsing** En divilhenno lemm, pouezañ e par poull ar glun gleiz a zelank ul laur e poent Mac Burney, devoudet gant diskas aezhennoù ar c'holon kleiz er sac'henn.

Rowel : **syndrome de ~** ◇ **Rowel's syndrome** ◇ **azoniad g. Rowel** Kevreted lupuz eritematus hag eritem liesstumm.

Roy et Jutras : **syndrome de ~** ◇ **Roy's syndrome** ◇ **azoniad g. Roy ha Jutras** Azoniad naouus dre gevreted un usteñv eus kroc'hen an dremm hag eus an eizhaennoù, un usteñv keloïdel eus tarsoù ar malvennoù hag un tevadur eus eskern an dorn hag a-wechoù eus an arvrec'h. Damheñvel eo ouzh troc'hgenn irviiek gant troc'hamaskornenn ar fas hag an eizhaennoù.

RPR test ◇ **RPR test** ◇ **proud** g. **RPR**, **proud herrek** ar **reagin plasmatek** Teskanv Sz. *Rapid Plasma Reagin Test* (Gl. *test rapide de la réagine plasmatique*, proud arnevez anspesadel da ziournat ar sifiliz, askenad ar *VDRL*).

RSA ◇ ◇ **DEH** Termen amaezhel eus mererezh an ospitalioù, teskanv *Diverrañ Eztiadur Hebanv* Gl. *Résumé de Sortie Anonyme*, savet diwar an *Diverrañ Eztiadur Skoueriekaet* (DES) Gl. *Résumé de Sortie Standardisée* (RSS) war-bouez ur meziant arbennik. Kevaraezañ a ra, hep diskuliañ ar rin micherel, treuzkas stlennadoù mezegel da renerezh an diazevadur, d'ar c'hengor mezegel diazevadur, da Renerezh Ranndirel an Aferioù Yec'hedel ha Kedvuhezal (Gl. *Direction Régionale des Affaires Sanitaires et Sociales*).

RSS ◇ ◇ **DES** 1 Termen amaezhel eus mererezh an ospitalioù, teskanv *Diverrañ Eztiadur Skoueriekaet* (DES) Gl. *Résumé de Sortie Standardisée*. « Nep klañvdiadur sevenet en domani obererezh deskrivet gant ar *Raklun Mezegelaat* ar *Reizhiadoù Silennañ* (Gl. *Programme de Médicalisation des Systèmes d'Information*, PMSI), zo divoud un DES amparet gant un pe lies diverrañ unvez vezegel (DUM), Gl. *Résumé d'Unité Médicale* (RUM)» 2 Teskanv *Kedrouedad Yec'hed* Gl. *Réseau Santé Social*, reizhiad stlenngehentiñ desezet e Frañs e 1999, amkanet da dreuzkas ar follennoù krouelioù elektronek, dreist holl.

Rubarth : **maladie de ~** ◇ **Rubarth's disease** ◇ **kleñved g. Rubarth** Avufo tredizhus ar c'hi devoudet gant un adenoviruz o tec'han strafuilhoù koazhadel, un derzhienn uhel hag alies ar marv evit ar furmoù lemm. E ergurañ a reer dre ar vaksinañ.

rubéfaction ◇ **rubefaction** ◇ **ruzderiñ** Ruzder kreñv ha dibad a 'r c'hroc'hen devoudet gant ur ruzderuzer.

rubéfiant ◇ **rubefacient** ◇ **1 ruzderus** aa. **2 ruzderuzer** g. **-ioù** 1 O tevoudañ ur ruzder kreñv ha dibad a 'r c'hroc'hen. 2 Gwezher ruzderus diounezet dre arloadurioù lec'hiek.

rubéole ◇ **rubella** ◇ **ruzig** g. Pore dispuilhat, tredizhus ha darreuziat, diwar ur viruz eus ar genad *Rubivirus*, eus kerentiad an *Togaviridae*, naouus dre un dispuilhad liesneuz, damheñvel war un dro ouzh hini ar ruzell ha hini ar skarlegenn, ha dre c'hwarr-ennoù liesel. Ar gounervezh a bad etre 14 ha 21 devezh. Pa zarvez ar c'hleñved gant ur vaouez dougerez hep hangae e c'hell devoudañ kammneuziadoù ganedigel (lagadel pergen) gant ar grouell. Bez' ez eus ur vaksinadur ergurañ. Debarañ a ra ar c'hleñved un hangae trebadek.

rubéoliforme ◇ **rubeoliform** ◇ **ruzigvanek** Heñvel ouzh ar ruzig.

Rubinstein et Taybi : **syndrome de ~** ◇ **Rubinstein-Taybi syndrome** ◇ **azoniad g. Rubinstein ha Taybi** Korred c'hanedigel dianav an arbenn anezhi gant kammneuziad kloppenn-dremm hag eus an izili (meud ledan) ha dilerc'h kefredel.

Rubivirus ◇ **Rubivirus** ◇ **Rubivirus** Genad viruzoù eus kerentiad an *Togaviridae*. Amparañ a reont o golo e koc'henn gitoplasm ar gellig danvevat, kizidik int ouzh an eter, hag o ment zo war-dro 60 nm. Emañ gwezher ar ruzig er genad-se.

Rubulavirus ◇ **Rubulavirus** ◇ **Rubulavirus** Genad viruzoù gant RNA eus iskerentiad ar *Paramyxovirinae*, kerentiad ar *Paramyxoviridae*, ennañ viruz ar jotorell.

Rud : **syndrome de ~** ◇ **Rud's syndrome** ◇ **azoniad g. Rud** Anaev ganedigel o kevrediñ iktioz, droukfell ha bredizilded.

rugine ◇ **rugine** ◇ **nazerez** b. Benveg surjianerezh, anezhañ ur blakenn dir, troc'hus ar ribloù anezhi, arveret da rasklañ gorreou an eskern ha dibegañ an amaskornenn. Lies doare zo.

Rukavina : **maladie de ~** ◇ **Rukavina's disease** ◇ **kleñved g. Rukavina** Liesnervennaoued amiloidel familhel arsellet en Indiana, Stadoù Unanet.

rupia ◇ **rupia** ◇ **rupia** g. Anaf kroc'hen naouus dre furmadur trouseknoù arzu, stalet e gwiskadoù haenek kengreiz, o c'holeiñ ur c'houliez foel linus.

Russell : corps de ~ ◇ **Russell's bodies** ◇ **korfoù** l. (g.) **Russell** Ebarzhennoù trenkennlen arsellet e kitoplasm ar plasmokit dic'henezhet.

Russell : syndromes de ~ ◇ ◇ **azoniadoù** l. (g.) **Russell** 1 sl. *Silver-Russell : syndrome de* ~. 2 Azoniad diwar un Anaf eus ar rannbarzh kilpenn-kitem a 'n empenn, naouus dre un direizhadur eus keal untu an egor, an hini kleiz pergen, kevredet gant ul ledkorfandanaoud. 3 sl. *Cachexie diencéphalique de Russell*.

Rust : hernie de ~ ◇ ◇ **ogad g. Rust** Seurtad ogad a-stevier o tiskenn izel pe izeloc'h etre ar gigenn a-stevier diavaez hag al lienenn stevier.

rutine ◇ **rutin** ◇ **rutin g.** Danvezenn strinkennek, glukozid douhennet eus delioù ar ruz, dezhi ur gwered gwareziñ war speurioù ar c'horrwazhied.

Ruvalcaba : syndrome de ~ ◇ **Ruvalcaba's syndrome** ◇ **azoniad g. Ruvalcaba** Azoniad kammneuziad delabaot, treuzkaset moarvat hervez ar mod aotozomek enkilek, o kevredañ, gant ar paotrig, troadised, isganadegezh, korrgloppenegerzh, dilere hegezh korf ha bred hag ivez lies kammneuziad a 'n eskern.

rythme ◇ **rythm** ◇ **korvez b.** Arreadur reoliek trovezhiek trouzioù pe zarvoudoù.

rythme alpha ◇ **alpha rythm** ◇ **korvez b. alfa** Korvez gwagennoù an empennvarwezad reol evit an oadour dihun, er paouez skiantennel ha serr e zaoulagad. An talm anezho zo etre 8 ha 13 dre eilenn, muiiek e rannbarzh kitem-kilpenn an empenn.

rythme bêta ◇ **beta rythm** ◇ **korvez b. beta** Korvez ar gwagennoù empennvarwezad a 'n oadour dihun, serr e zaoulagad, o c'hoarvezout eus ar gwagennoù bihanheled gant an talm etre 18 ha 35 Hz. Muiiek eo e rannbarzhioù tal an empenn.

rythme delta ◇ **delta rythm** ◇ **korvez b. delta** Heuliad gwagennoù empennvarwezad gorrek, dezho an talm 1-4 Hz hag un heled uhel a 100 mV, sinuzoidel ha reoliek o neuz (korvez δ unneuz) pe direoliek (korvez δ liesneuz), arsellet e-doug kentañ bloavezh an hoali, ha gant an oadour tizhet gant un anaf empenn grevus.

rythme idioventriculaire accéléré ◇ **accelerated ventricular rythm** ◇ **korvez b. hangofigel herrekaet** Migorvez hep grevusted dibarek diwar werederezh spanaennek ur greizenn gofigel ezlec'hiat. Naouus eo dre genheuliad hogos reoliek war ar c'halonvarwezad, gant un talm gavalet etre 60 ha 100 dre vunud, eus 4 da 30 a gemplezhioù kofigel ledanaet, damheñvel o neuz ouzh an dreistsistolioù kofigel. Kemm zo etre an kez korvez kofigel, dizalc'h diouzh re, gorrekoc'h, ar c'hentezioù, hag ar gorvez hangofigel boas, gorrekoc'h (120-200 dre vunud) ha hini ar c'halonusteadoù kofigel klasel, herrekoc'h (140-200 dre vunud). Darvezout a ra dreist holl e-doug pazenn lemm angwazhiad ar c'haher kalon, pa vez gorrek ar gorvez c'hodel; ne c'hrevusa ket erbedad an angwazhiad.

rythme pendulaire ◇ **pendulum rythm** ◇ **korvez b. vomeder** Korvez kalon ar grouell, naouus dre geitaat an daou drouz.

rythme réciproque ◇ **reciprocal rythm** ◇ **korvez b. kizlank** Seurtad migorvez kalon ma telank ar broud o kevaraezañ an argrezadoù kalon, ganet er c'hloz kentez-kofig, argrezadoù ar c'hofigoù ha goude, ent kizreat, re ar c'hentezioù.

rythme du sinus coronaire ◇ **coronary sinus rythm** ◇ **korvez b. ar god kuruner** Korvez kalon ezreol ha dibaot, dibad ar peurliesañ, naouus war ar c'halonvarwezad dre leielaat ar gwagennoù kentez P e D₂, D₃ hag aVF ha dre bad reol an tredanren kentez-kofig. Devoudet e ve dre zilec'hiadur ar greizenn delankañ lammoù ar galon etrezek difourk gwazhienn vras ar galon. Bez' ez eo ur seurtad korvez klomel pe kevree.

rythme théta ◇ **theta rythm** ◇ **korvez b. teta** Neuz kleñvedel a 'r c'halonvarwezad naouus dre un heuliad luskelladoù gorrek (gwagennoù θ), dezho un talm etre 4 ha 7 c/s, ur barr a 50 mV hag ur stumm reoliek pe reoliekoc'h. Arsellet e vez en tachadoù ividig-kitem eus an empenn e degouezhioù 'zo a c'houzañvder en empenn.

rythmologie ◇ **rythmology** ◇ **korvezouriezh b.** Diskiblezh o studiañ korvez ar galon

S

S : composé ~ de Reichstein ◇ Reichstein's substance **S** ◇ azoad g. **S Reichstein** 11-desoksikortizol, diaraoger ar c'hortizol (pe hidrokortizon) en enaoz an hormon-se gant ar gaenuslouezhenn.

3S : syndrome ~ ◇ **3-S syndrome** ◇ azoniad g. **3S** Teskanv Sz. *Short-ear*, *Skeletal dysplasia*, *Short stature*, azoniad kammneuziad el dibaot kaer, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, o kevrediñ korreded, ezvezañs ar padelleg, klopennisvoll, kammviziegezh, korrskouarnegezh daoudu ha korrvavegezh.

Sabouraud : milieu de ~ ◇ **Sabouraud's agar** ◇ metoù g. **Sabouraud** Metoù tiñvañ evit ar foue hag ar govevion, ennañ glukoz (20 g), pepton (10 g) ha dour strilh (1 000 mL).

saburral ◇ **saburral** ◇ **stloagennet** aa. A-zivout glaourgenn an teod goloet gant ur gwiskad gwenn arvelen, ar stloagenn. Stad stloagennek an teod zo un azon stadet boas er strafuilhoù kreuzel, e dalc'h pe get ur c'hleñved hollek.

saccharinate de sodium : **épreuve au** ~ ◇ ◇ **proud** g. ar **sakarinat natriom** Proud amkanet da zewerzhañ tizh amred ar gwad. Muzuliañ a reer ar pad etre ensinkladur engwazhiennel 3-5 mL eus un dourzilezhenn sakarinat natriom da 33 % hag ar mare ma verzh ar gouzrec'h ur vlazenn sukr; ent reol emañ er gavael 10-16 eilenn; hiraet eo e degouezh falladur kalon; berraet eo er skortedoù kalon uhelgas (amwad, fic'h talmerenn-gwazhienn, skoedusvorc'h) hag er c'halonnaouedoù ganedig gant ur skoev dehou-kleiz. An dehidrokolat natriom a c'hell bezañ arveret e-lec'h ar sakarinat; merzhout a ra neuze ar gouzrec'h ur vlazenn c'hwerv. Ar proudoù-se zo aet dispredet.

saccharolé ◇ **saccharate** ◇ **sakarolad** g. Angevezh apotikel ennañ ar sukr da ambrougenn.

Saccharomyces ◇ **Saccharomyces** ◇ **Saccharomyces** Genad foue, o c'hoarvezout eus un niver bras a spesadoù arveret er bouederezh evel goüzennoù, da skouer *Saccharomyces cerevisiae*, ar goell bier.

saccharomycose ◇ **saccharomycosis** ◇ **sakaromikoz** g. Termen o teanviñ ar c'hleñvedoù devoudet gant ar goelloù.

saccharose ◇ **saccharose**, **sucrose** ◇ **sakaroz** g. Diholozid dehouc'hwelus, amparet gant glukoz ha fruktoz. Bez' ez eo ar sukrenn vouedel kenderc'het diwar ar boetrabez pe ar c'horz sukr. Bervet gant trenkennoù pe dre wered enzimoù 'zo (enzim pervez pergen) e tedaol glukoz ha fruktoz.

saccharosurie ◇ **saccharosuria** ◇ **troazhsakarozegezh** b. Bezañs nemedennek sakaroz en troazh.

saccharure ◇ ◇ **sakarur** g. Sakarolad danzeet dre skuilhañ war sukr tenturioù alkoolek pe eterek pe alkooolaturioù, ha goude dre sec'hiñ ha bruzunañ.

sacculaire ◇ **saccular** ◇ **sac'hheñvel** aa. E stumm ur sac'h.

saccule ◇ **sacculus** ◇ **sac'hig** g. Darn vazhoulek ar milendall lienennek, loet etre ar grozhig ha san ar velc'houedenn.

sacralgie ◇ **sacralgia** ◇ **kroazellost** g. Laur sezet er groazell.

sacralisation ◇ **sacralization** ◇ **kroazellekaat** Diorreadur reñverek balegoù treuz ar pempet mellenn dargreiz ha kendeuzad an kez mellenn gant kentañ mellenn ar groazell. Anv a vez ar peurliesañ eus *ezreolderioù ardreuzadel* (Gl. *anomalies transitionnelles*).

sacrocoxalgie ◇ **sacrocoxitis** ◇ **lezkroazellost** g. Arzfo henek ar juntad kroazell-klun. Ent ordinal e vez amberzet an anv-se da dorzhelegezh ar c'henvell kroazell-klun.

sacro-iliite ◇ **sacroiliitis** ◇ **lezkroazellost** g. Tanijenn ar c'henvell kroazell-klun o tevoudañ un andrafted arc'hwelel ha loan-pe peñsost, dezho a-wechoù saezhennadurioù gwrizienneel.

sacrolombalisation ◇ **sacralization** ◇ **kroazeldargreizekaat** Dargreizekaat ha kroazellekaat war un dro, o vezañ ma 'z int diaes da ziforc'hañ a-wechoù.

sacrum ◇ **sacrum** ◇ **askorn** g. **kroazell** Askorn undañvat ha kreizer amparet gant soutadur pemp mellenn ar groazell. Kendaoliñ a ra da furmiñ al lestr.

sacrum basculé ◇ **sacrolisthesis** ◇ **kroazellinkañ** Rikladur war raok an askorn kroazell e-keñver pempet mellenn an dargreiz, da heul ul laoskaat a 'r stagelloù kroazell-klun devoudet gant un daraez pe ar vec'hiegi.

SADAM ◇ ◇ **ALMIG** Teskanv *azoniad laurviarc'hwelel ar c'henvell ividig-gaved* Gl. *Syndrome Algo-Dysfonctionnel de l'Articulation temporo-Mandibulaire*, mifiñv laurus ha trouzus an kez kenvell, gant leiadur heled ar fiñvoù anezhañ.

sadisme ◇ **sadism** ◇ **sadegezh** b. Troziadezh revel ma 'z eo ar boziañ a-zalc'h ouzh ar gouzañvder pe ar mezhkadur a skoer gant an amgen. Ar bredelfennerezh a astenn keal ar sadegezh en tu all d'an droziadezh deskrivet gant ar revoniezh, dre lakaat a-wel furmoù eginek, bugelvezhel pergen, anezhi, hag o sellout outi evel ur gedrann diazez eus al luzadurezh. Ar sadegezh ent strizh a c'hoarvez eus kenstroll ar revelezh hag ar feulster ouzh an amgen. En ur c'hemeradur laoskoc'h ez eur techet hiziv da envel sadegezh holl erzerc'hadurioù ar feulster ken ma teu an termen da vezañ kenster gant argadusted.

sadomasochisme ◇ **sadomasochism** ◇ **sadomazoc'hegezh** b. Troziadezh revel o kevredañ sadegezh ha mazoc'hegezh.

sage-femme ◇ **midwife** ◇ (*sl.maïeuticien, -ienne*).

sagittal ◇ **sagittal** ◇ a-saezh, diasaezh aa. Loet en ur blaenn a-zerc'h ha durc'haet a ziaroak da ziadreñv.

saignée ◇ **bloodletting** ◇ **gwadañ** Karzhañ kuradel ur c'hementad gwad bennak dre enbenañ ur wazhiedenn c'horre. Kemm a lakaer etre ar *gwadañ hollek*, pa vez eztennet gwad eus ur wazhienn (*gwazhiennenbenañ*) pe eus un dalmerenn (*talmerennenbenañ*) hag ar *gwadañ lec'hiek*, pa vez lamet gwad eus korrwazhied (mandoziou gant araskadoù, gelaoued). *Gwadad* a vez graet eus ar gwad eztennet.

saignement : temps de ~ ◇ **bleeding time** ◇ **amzer** b. **wadañ** Amzer rekizet evit astaliñ ar gwadañ, embreget dre flemmañ flipezenn ar skouarn. Padout a ra ent reol etre 3 ha 4 min. Hiraet eo ent ezreol er purpuraoù gwazhiedel, en olpladanoù hag er pladananaezioù, hag ivez en dioueroù fibrinogen ha parennoù Willebrand.

Saint : triade de ~ ◇ **Saint's triad** ◇ **triad** g. **Saint** Kevredet ur c'hrouanegezh vestlet, ur vogodegezh kolon hag un avelenn c'hremel.

Sakel : méthode de ~ ◇ **Sakel's method** ◇ **hentenn** b. **Sakel** Prederiadur ar skizofreniezh diwar-bouez bleuizioù devoudet gant ensinkladurioù insulin. Aet eo e-maez arver.

salacité ◇ **salacity** ◇ **keventridigezh** b. Doug d'an darempredoù keventrek.

salicylate ◇ **salicylate** ◇ **salikilat** g. Hal an drenkenn salikiek. Ar salikilat natriom a vez arveret evel enepremmeg (dre euvriñ).

salidiurétique ◇ **saluretic** ◇ **1 holenusvorc'hus** aa. **2 holenusvorc'her** g. **-ioù** 1 O vuiaat dioulañ ar c'hevionennoù (natriom ha kaliom pergen). 2 Danvezenn holenusvorc'hus.

salivaire ◇ **salivary** ◇ **halviñ, halvel** aa. A-zave d'an halv. — *gwagrennoù halviñ* : tri daoudañv gwagrennoù ezvorc'hañ e kavenn ar genoù, ar *gwagrennoù kilvoc'h*, ar *gwagrennoù endan-c'haved* hag ar *gwagrennoù endan-deod*. — Menegomp ivez ar *gwentl halvel*, ar *c'hrouanegezh halvel*, an *enzimoù halvel*.

salive ◇ **saliva** ◇ **halv** g. Liñvenn alkaliek boull, frontek, borc'het gant ar gwagrennoù halviñ, enni dour, mukin, albumin, ptialin, globulinoù, karbonatoù ha fosfatoù alkaliek, sulfokianat kaliom ha toksinoù 'zo. An halv a dalvez da c'hlebiañ ha da vlotaat ar boued, o kvaraevañ evel-se ar chaokat ha, bennozh d'an enzim a zo ennañ — ar ptialin —, e treuzfurm an ampez e dekstrozh ha maltoz.

Salla : maladie de ~ ◇ **Salla's disease** ◇ **kleñved** g. **Salla** Anez lizozomel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, naouus dre un dilerc'h bred, kammneuziad an dremm ha hogennadur trenkenn sialek er giwadoù.

salle de garde ◇ **on-call room** ◇ **sal** b. **ar c'hoskor** En ospitalioù Frañs, stavell amberzet d'an diabarzhiaed. Ned eo ket ur gwazva amkanet da zegemerout gouzviaded diwar zifrae.

salle de réveil ◇ **recovery room** ◇ **sal** b. **defraouiñ** Pezh gouestlet da evezhierz an oberataidi ha gouzviaded all o paouez kaout un dieraeziñ hollek, betek ar mare ma tistrofant d'o c'henskiant.

Salleras-Zarate : syndrome de ~ ◇ **Salleras-Zarate syndrome** ◇ **azoniad** g. **Salleras-Zarate** Kammneuziad lagad o kevredañ ul lagadseizi, un isstival hag ezreolderioù stumm ha mierwezh ar mab lagad.

Salmonella ◇ **Salmonella** ◇ **salmonella** Genad bakteri Gram leiel eus kerentiad an *Enterobacteriaceae*, ennañ ur spesad ha lies isgenad bazhilli Gram –, kiriek d'ar salmonellozioù diseurt. Ar serotipoù *S.* a vez hennadet dre o erwezhoù hangaeel ouzh un antigen (antigenoù O, H, Vi) hag anvet alies dre an orin douaregorel anezho (da skouer : *S. Dulenn*).

salmonellose ◇ **salmonellosis** ◇ **salmonelloz** g. Termen genadel oc'h arouezañ ar poreadoù devoudet gant garvevion eus ar genad *Salmonella*.

salpingectomie ◇ **salpingectomy** ◇ **korzennezvenañ** Dilemel surjaniel unan pe an div gorzenn grozh.

salpingite ◇ **salpingitis** ◇ **korzennfo** g. 1 Tanijenn unan pe an div gorzenn grozh. 2 Tanijenn unan pe an div gorzenn glevedel.

salpingographie ◇ **salpingography** ◇ **korzennluniñ** Skinluniñ ar c'horzennoù krozh goude ensinkladur un aozad dargemm demeraer e gouzoug ar grozh.

salpingolyse ◇ **salpingolysis** ◇ **korzennezglenañ** Gwezh surjaniel, anezhañ dizalc'hediñ ar grozh hag he founilh dre skejañ ar glenelloù trogorzennel.

salpingo-ovariopexie ◇ **salpingo-ovariopexy** ◇ **korzennvierenz** **Aanlenañ** AAanlenañ ar vierenz ouzh ar gorzenn.

salpingo-ovarite ◇ **salpingo-ovaritis** ◇ **korzennvierenzfo** g. Tanijenn gevret ar vierenz ha korzenn ar grozh.

salpingoplastie ◇ **salpingoplasty** ◇ **korzennatleviñ** Dazluniañ surjaniel ur gorzenn grozh, ent dibarek evit he azforzhekaat.

salpingorrhaphie ◇ **salpingorrhaphy** ◇ **korzenndlita** Krafelañ korzenn ar grozh.

salpingoscopie ◇ **salpingoscopy** ◇ **korzennengweliñ** 1 Imbourc'h gwask a-c'hargadenn ar gorzenn glevedel diwar-bouez ur salpingoskop, ebarzhet er fri-c'hargadenn dre hent ode draoñ ar fri. 2 Imbourc'h ragoberatael glaourgenn ar gorzenn grozh diwar-bouez un endoskop, amkanet da resizañ ennegadoù ur gorzennatelviñ erveziat.

salpingostomie ◇ **salpingostomy** ◇ **korzennezforzhañ** Dewerc'hañ un digor e korzenn ar grozh aet anforzhek (gant ur c'horzennfoeñv, da skouer) pe evit prederiañ ur vec'hiegi ezkrzhat (korzennat), en ur lezel kev an ar gorzenn hag ar vierez da assav ar frouezhusted.

salpingotomie ◇ **salpingotomy** ◇ **korzennenbenañ** Digeriñ ent surjiael ur gorzenn a 'r grozh.

Salzman : **test de ~** ◇ **Salzman glass bead test** ◇ **prouad g. Salzman** Hentenn o kevaraezañ andalañ glenusted ar pladanoù ouzh boulligoù gwer. Ar gwad hollel pur a dremen dre ur gelfennad voulligoù ha muzuliañ a reer ar c'henfeur eus ar pladanoù dezalc'het.

Salzman : **kératite nodulaire de ~** ◇ **Salzmann's nodular corneal dystrophy** ◇ **korsaeo g. nozelek Salzman** Anaez dic'henezhadel ar gornsaer, naouus dre vezañs koagennoù bihan treuzluc'hus a vent gant greun riz, o tont alies da heul ur c'hornsaeo filhoc'hennec. Dedreiñ a ra gorrek hep nemeur a strafuilhoù arc'hwelel.

SAMU ◇ ◇ **GMED** Gwreskanv diwar *Gwazadur Gwarded Mezegel Difrae* Gl. *Service d'Aide Médicale d'Urgence* gwazva ma tegemer ur mezeg kenurzhiar galvadennoù pellgomz. Kenurzhiañ a ra an amougoù evit ar c'houzviaded tizhet gant un anaez grevus ha trummat.

sanatorium ◇ **sanatorium** ◇ **sanatorium g.** Kurdi amkanet da brederiañ ar glañvourion tizhet gant an dorzhellegezh skevent pe e-maez skevent.

Sandhoff : **maladie de ~** ◇ **Sandhoff's disease** ◇ **kleñved g. Sandhoff** Rizh gangliozidoz hollek diwar un divig hêrezhel a heksozaminidaz. Anaez treuzkaset er mod aotozomek enkilek.

Sandifer : **syndrome de ~** ◇ **Sandifer's syndrome** ◇ **azoniad g. Sandifer** Gant ar bugel, kevreted un avelenn c'hremel hag ur pennamm spanaus a-zalc'h gant ur gindrehent kreuz-treizher.

Sandwich : **méthode du ~** ◇ **Sandwich technique** ◇ **hentenn b. ar brec'hdan** Kalvezder dezventañ hangaeel ma vez durc'haet lerc'h-ouzh-lerc'h ouzh daou hanload antigen dispartiet a 'r molekul da studiañ (e-se "brec'hdanet") daou antikorf, unan lenet ouzh ar skor sonnel (speur ur gibig, ur gorzenn pe ur voullig), egile o vezañ kevreted ouzh un enzym o treluskañ un dazgwered dinoet dre ur geduzenn dre liv pe dre gendreluc'hañ.

sang ◇ **blood** ◇ **gwad g. -où** Liñvenn ruz, tev, oc'h amredañ er reizhiad wadgwazhiedel, enni elfennoù kelligel luniek (hemati, leukokit ha pladanoù) hag ur parzh liñvel, ar plasma. Enni ez eus c'hoazh lies danvezenn (protein, meinnoù hag elfennoù aezhel). Tolz hollel ar gwad zo war-dro kement hag 1/13 eus tolz ar c'horf. Ennañ ez eus 78 % dour hag 22 % a elfennoù sonnel.

sang : **accident d'exposition au ~** ◇ **accidental exposure to blood** ◇ **ardizh g. darvoudel ouzh ar gwad** Darvoud labour, gwad pe ul liñvenn vevel gwad enni enkoret ent tregroc'henele pe c'hoazh strimpet war ur glaourgenn pe ur c'hroc'hen anafet, ar gwad o vezañ poreüs marteze. Ar riskl a dreuzkas kleñvedoù evel an avufoioù B pe C, pe c'hoazh an haza a c'hourlaka diarbennnoù ergurañ trummat.

sang laqué ◇ **laked blood** ◇ **gwad lakennet** Gwad boull ruz sklaer, dre berzh distruj ar c'helligoù ruz ha tremen an hemoglobine er plasma.

sangsue ◇ **leech** ◇ **gelaouenn b. -ed, gelaoued** Anvad kaozeek an Hirudineged, urzhad an Annelid, dezho ur vandoz ouzh an daou benn. Ar spesad gwadezat *Hirudo medicinalis* a veze arveret gwechall da dennañ gwad.

sanguicole ◇ **sanguicolous** ◇ **gwadtrigat** aa. A-zivout an arveaded o vevañ er gwad.

sanie ◇ **sanies** ◇ **linwad g.** Danvez linek ha flaerius, mesket gant gwad.

sanieux ◇ **sanious** ◇ **linwadek** aa. Gant linwad, a-zivout un angreizh, ur gouli.

sanitaire ◇ **sanitary** ◇ **1 ~yec'hed; ar yec'hed; yec'hedel** aa. **2 bonanvezel** aa. 1 A-zave d'ar yec'hed ha d'ar yec'hed-ouriezh, en ur par strollennel pergen. 2 Evit parraat ouzh daouezh ster *yec'hedel* e c'haller ouzhpennañ an termen *bonanvezel* : a-zivout *bonanvez* (Gl. *état de santé, état sanitaire*) an dud, eleze a-zivout reolde o yec'hed.

santé ◇ **health** ◇ **yec'hed g.** Stad vonan, reol an arc'hwelioù bevedel ha bredel. Hervez despizadur an ABY (1946) ez eo ar yec'hed ur stad a beurhevoud bevedel, bredel ha kedvuhezal ha n'eo ket hepken an ezvezañs a gleñved pe a nammed.

santé : **établissement de ~** ◇ **health facility, care facility, health establishment** ◇ **diaezadur g. yec'hed, yec'heti g., kurdi g.** Seurt diazevadurioù a c'hell bezañ foran pe brevez, hag evit an eil re, arc'hantus pe get.

santé : **professions de ~** ◇ ◇ **micherioù l. (b.) yec'hedel** Hervez Dezveg foran ar Yec'hed ez eo rannet ar micherioù yec'hedel e tri rumm :

1. Ar micherioù mezegel : mezeion, dentourion hag amiegeion (mell. L4111-1 da L4163-10).
2. Micherioù al liaerezh, ar fizik mezegel : liaerion, darbariaded liaerezh, darbariaded liaerezh ospitalel, fizikourion vezegel (mell. 4211-1 da 4252-3).

3. Micherioù an eilerion vezegel (klañvdiourion, leuñvourion, troadourion, bregurourion ha bredloc'hadourion, mouezh- ha selleeunerion, embregataerion tredanskinouriezh vezegel ha kalvezourion arnodvaoù mezegel, klevosodourion, optikourion-lunedourion, dentosodourion hag amsteudellerion, bouedourion), adklañvdiourion, eilerion vabsavouriezh hag ambulañsourion (mell. 4311-1 da 4394-3).

Gant micherioù 'zo ez eus un dezvad reolenet dre un deved embreger o respizañ ur roll gwezhioù mezegel aotreet d'ar vicherion angorzh. A du 'rall, seizh micher zo dindan reolerezh pep a urzh (mezeion, liaerion, amieion, dentourion, klañvdiourion, leuñvourion, troadourion). An urzhioù-se zo aozadurioù korfuniadel dezho ur roll derc'houezañ ar vicher, hag ivez ur gefridi a wazerezh foran dre berzhiañ e reolenadur ar pleustr ha dre sammañ roll ur varnadurezh kenurzhel evit an izili, a zo ret dezho bezañ evit gallout embreger o micher.

santé communautaire ◇ **community's health** ◇ **yec'hed strollennel** Trezerc'hel ha herouezañ yec'hed ur strollenn a c'houlenner ar perzhiaour oberiat anezhi.

santé publique ◇ **public health** ◇ **yec'hed kevredin** Hervez Aozadur Bed ar Yec'hed ez erdal meizad ar *y. k.* kement a ra dave da yec'hed ur boblañs en he metoù bevañ, na pa ve evit a sell an ergurañ, ar yec'hedouriezh pe ar gedvuhez.

Santy : **opération de** ~ ◇ ◇ **oberatadenn b.** **Santy** Dazbidañ ar youlc'h dre an hent kof-kroazell gant kemmirout ar c'helc'hstrishaer, ma tiskenner ar pervez drezañ. Ar wezhiadenn-se a vez embreget e degouezh kankr ar youlc'h.

Sanyal : **conjunctivite de** ~ ◇ ◇ **Sanyal' conjunctivitis** ◇ **kevresaefo g.** **Sanyal** Kevresaefo untu kuñv arsellet en India, diwar un aktinomikoz, dezhañ un neuz voulouzek. Dedreñ a ra ent emdarzh d'ar pare dindan 8-10 sizhun.

saphène ◇ **saphena** ◇ **spis** aa. O toareañ gwazhiennoù gorre an izili traoñ hag an nervennoù ambrouger anezho.

saphénectomie ◇ **saphenectomy** ◇ **spisezvenañ** Dazbidañ hollel pe darnel ur wazhienn spis, e prederiadur surjanel an teuc'helloù.

SAPHO : **syndrome** ~ ◇ ◇ **SAPHO syndrome** ◇ **azoniad IAPHA** Kevreted ur pustuloz kroc'heneel hag un askornfo speur ar brus. Dianav eo arbenn an azoniad a zo teskanv : Irgennfo, Akne, Pustuloz, Hiperostoz dre Askornfo.

saponé ◇ ◇ **soavonet** aa. A-zivout ul lia, soavon ennañ.

saponification ◇ **saponification** ◇ **soavonaat** Dazgwered kimiek a dreuzfurm an druzennoù e soavon dre wered ur vazenn. An dourrannadur-se a skrifer : ester druz + bazenn → hal (soavon) + alcool.

saponulé ◇ ◇ **soavonegenn b.** Tentur alkoolek uhel a-walc'h ar bec'h soavon ennañ da gaout ur c'hantalc'h kaotek.

saponure ◇ ◇ **soavonadur g.** Meskad soavon e poultr ha danvezzennoù rousinek pe douhennus.

saprogène ◇ ◇ **breineiat** aa. O tevoudañ ar breinañ.

sapronose ◇ **sapronosis** ◇ **sapronoz g.** Anez devoudet gant ur garvev saprofitek ent voas, e degouezh ur falladur goudrevn.

saprophyte ◇ **saprophyte** ◇ **1 kelanat** aa. ; **saprofitek** aa. **2 kelanad g.** -ed 1 A-zivout bevion (bakteri, foue, h.a.) a denn o boued eus danvezioù bevel o vreinañ. 2 Bev kelanat. Ankleñvedus ar peurliesañ, ar c'helanad a vez en ervez da vezañ kleñvedus dre berzh an toksinoù borc'het ganto.

saprozoïte ◇ **saprozoïte** ◇ **saprozoït** aa. & **g.** -ed Loenigan (protozoenn) a denn e voued eus danvezioù bevel o vreinañ.

SÂQRS, SÂQRST ◇ **SÂQRS, SÂQRST** ◇ **SÂQRS, SÂQRST** Arouezioù an tredanahelioù keitat QRS pe QRST, durc'haet en egor ha n'eo ket mui bannet war ur blaenenn a-dal.

saralasin ◇ **saralasin** ◇ **saralazin g.** Gourzhaler kevezer an angiotensin, arveret trefennet evit deznaou an uswask lounezh-wazhiedel (prouad ar saralazin).

sarcocele ◇ **sarcocele** ◇ **sarkokel g.** -ioù Nep yoc'henn pe koeñvenn a 'r glidenn pe a 'n argell.

Sarcocystis hominis ◇ **Sarcocystis hominis** ◇ **Sarcocystis hominis** Spesad kokidi kiriek, gant an hangaeastaleg, da boreadoù pervezel grevus.

sarco-épiplocèle ◇ **sarcoepiplotcele** ◇ **sarkoepiplotkel g.** -ioù Danterogad kevredet gant ur sarkokel.

sarco-hydrocèle ◇ **sarcohydrocele** ◇ **sarkohidrokel g.** -ioù Sarkokel kevredet gant un dourvozhell.

sarcoïde ◇ **sarcoid** ◇ **sarkoid g.** Termen arveret evit furmadurioù kroc'hen yoc'hennel, nozelek o neuz, naouus d'ar sarkoidoz (kleñved Besnier-Boeck-Schaumann).

sarcoïdes cutanées ◇ **sarcoid of Boeck** ◇ **sarkoidoù kroc'hen** Kenster da *lupuzvanoù kuñv strewek* Gl. *lupoïdes bénignes disséminées*. Anez o naouiñ dre un dispuilhad nozelennoù hanterbellennek ruzvok pe azgell, o ment etre hini ur c'hreunenn vell hag ur bizenn vras (lupuzvanoù milier strewek Darier, lupuz milier) pe brasoc'h (kraoñenn gelvez pe plakad : sarkoid kroc'hen, lupuzvan torosennek pe e plakad Boeck), dinodet en derm, sezet war an dremm, war an divskoaz ha tal astennidigezh an izili. Hir eo dedro an anaez-se (eus 5 da 10 vloaz) ha kuñv eo. Anavezet fall eo an natur anezhañ.

sarcoïdes hypodermiques ◇ **hypodermic sarcoid** ◇ **sarkoidoù endan-groc'hen** Ozvennoù ar c'houdonenn arsellet e kleñved Besnier-Boeck-Schaumann (a 'r rizh Darier-Roussy) hag en eritem argalet Bazin.

sarcoïdose ◇ **sarcoidosis** ◇ **sarkoidoz g.** Kleñved reiiziaed henek o naouiñ ent gwiaoniel dre c'hranulomoù epitelvanek ha keurgelligel, kuit a varvennañ. Savelañ a ra al lec'hiadurioù kevarall (skevent, gwerblennoù, kroc'hen, lagad, arzoù, eskern, h.a.)

ar furmoù klinikel daskenek anavezet. Bez' ez eus ur riskl a wadusvec'h kalkiomm en arbenn eus borc'hadur vitamin D gant ar granulomoù. Azoù e vez an dedro ar peurliesañ dre ar c'horkoidoù.

sarcoleme ◇ **sarcolemma** ◇ **sarkolemm** g. Koc'henn voan, a natur genglenel, o c'hronañ pep kaherwienn rizennek.

sarcomatose ◇ **sarcomatosis** ◇ **sarkomatoz** g. Kleñved o naouiñ dre furmadur sarkomoù.

sarcomatose multiple hémorragique de Kaposi ◇ **Kaposi's sarcoma** ◇ **sarkomatoz liesel gwadliñvel Kaposi** pe **sarkom Kaposi** Nozelennoù pe plakadoù persvok, kroc'heneel pe e-maez kroc'heneel, e dalc'h neridigezh kelligoù gwerzhidek ha gwazhiedel, anklonel, liesannon ar peurliesañ. Bez' ez eus furmoù kroc'heneel anlaur ha furmoù keuzius gant tizhadoù a 'r flugez, a 'r skevent pergen. Dec'haneet eo ar c'hleñved-se gant ar virus HHV8. Tizhout a ra ar c'houziviaded eus ardroioù ar mor Kreizdouarel hag an hangaeasteleion (treuzplantadourion ha hazaieion). Boaziet eo an anvad *sarkom*, hogen ned eo ket kantreizh, pa n'eus klonelezh ebet.

sarcome ◇ **sarcoma** ◇ **sarkom** g. Yoc'henn yud evodet eus kelligoù mezenkimatus, a c'hell dinodiñ diwar goust kelligoù a 'r gwriad kenglenel boutin (fibrosarkom), kelligoù a 'r gwriad kenglenel diforc'hekaet (kondrosarkom, miosarkom, liposarkom, h.a.) pe diwar goust ar gwriad gwerblennel (limfosarkom, retikulosarkom). Ar peurliesañ e vez yud kenan ar yoc'hennoù-se.

▷ **sarkom gant mieloplaks** Sarkom gant keurgelligoù lieskroañell (mieloplaks) a vez arsellet a-ziuz en eskern.

▷ **sarkom angiomaen** (Gl. *sarkom angiolithique*, Sz. *psammoma*) Sarkom dinodet en nerved kreiz hag ennañ fetisaennoù razez.

▷ **sarkom blokadvanek** (Gl. *sarkom bothryoïde*, Sz. *botryoid sarcoma*) Yoc'henn mesenkimatus yud dezhi neuz ur blokadvanek, arsellet gant ar bugel ha sezet e rannbarzh ar god troazhañ-geneel.

▷ **sarkom empennvanek** (Gl. *sarkom encéphaloïde*, Sz. *encephaloid sarcoma*) Sarkom gant ur c'hantalc'h blot a denn e neuz d'ar steuñvenn empennel.

▷ **sarkom hordennaouek** (Gl. *sarkom fasciculé*, Sz. *fasciculated sarcoma*) Sarkom amparet gant hordennoù kelligoù gwerzhidek.

▷ **sarkom gwerzhidaouek** (Gl. *sarkom fusocellulaire*, Sz. *fusiform sarcoma*) Sarkom amparet gant kelligoù gwerzhidek.

▷ **sarkom boullaouek** (Gl. *sarkom globocellulaire*, Sz. *encephaloïd sarcoma*) Sarkom amparet gant kelligoù boullek, arront.

sarcome de Hodgkin ◇ **Hodgkin's sarcoma** ◇ **sarkom Hodgkin** Hervez Jackson ha Parker, unan eus an teir furn neuziadurel a 'r limfogranulomatoz yud : e-barzh ar gwerblennoù ez eus ur c'hementad bras a gelligoù Steinberg, un nebeut limfokit hag un nebeut fibroz. An kez sarkom a ve ur furn ardreuziñ etre kleñved Hodgkin hag ar retikulosarkom gwerblennel.

sarcome de Rous ◇ **Rous sarcoma** ◇ **sarkom Rous** Sarkom ar yer, treuzkasadus ha dec'haneet gant ur virus, hini Rous.

sarcomère ◇ **sarcomere** ◇ **sarkomer** g. -où Unvez argrezañ ar gigenn rizennek, loet etre div rizenn Z eus ar c'haherwian.

sarcophagie ◇ **sarcophagy** ◇ **sarkofagiezh** b. Hanren gant kig hepken.

sarcoplasma ◇ **sarcoplasm** ◇ **sarkoplasm** g. Kitoplasm ar c'haherwiennoù amparet gant hersadoù hir o c'hronañ ar c'hrañelloù hag o tispartiañ an hordennoù kaherwianoù an eil re diouzh ar re all.

sarcopte ◇ **itch mite, scabies** ◇ **sarkopt** g. -ed Arvevad loenel en orin an hakrez, naouus dre *irvi an hakrez*, klazet gant parez ar sarkopt en ezkroc'heneel da sankañ enno he vioù.

Sarcoptes scabiei ◇ **Sarcoptes scabiei** ◇ **Sarcoptes scabiei** Arvevaded eus urzhad an Akarianed o tevoudan anafoù an hakrez (sl. *sarcopte*).

sarcosporidiose ou **sarcocystose** ◇ **sarcosporidiosis** ◇ **sarkosporidiz** g. Erialerezh — ar chatal pergen, hogen an den ivez — gant ar sarkosporidi, naouus dre furmadurioù kistek loet er c'higennoù.

sardonique : **rire** ~ ◇ **sardonic grin** ◇ **c'hoarzh g. sardonek** Termen mezegel kozh evit un anaez dasstrizhek eus kigennoù an dremm, o reiñ un asvan a c'hoarzh. Enebrezh arsellet gant an tetanoz.

sarin : **gaz** ~ ◇ **sarin** ◇ **aezhenn b. sarin** Aezhenn gad nervbistrius bevfosforet (metiltiofosfonat etil).

Sarmiento : **orthèse de** ~ ◇ **Sarmiento's orthosis** ◇ **steudell b. Sarmiento** Steudell voulet amkanet da gorfueunerezh torroù treuzenn ar paler.

Sarmiento : **plâtre de** ~ ◇ **Sarmiento's plaster** ◇ **steudell b. Sarmiento** Korfueunañ an torroù gar gant plastr moulet, o kevaraezañ an harpañ hag o lezel deliver ar c'henvelloù is- hag ussezet d'an torr.

sartan ~ ◇ **sartan** ◇ **sartan** g. -ioù Kerentiad gourzhalerioù buzerioù an angiotensin II arveret e prederiadur an uswask talmerel, ar penn stell anezho o vezañ al losartan.

SARS ou **SRAS** ◇ **Severe Acute Respiratory Syndrome** ◇ **SRAS** pe **azoniad analadel lemm garv (AALG)** Skeventad koronavirusel grevus, lemm, terzhiennek, gripvanek, kevret gant ollimfokit, olpladanoù ha gwadusvec'h LDH ha CPK. An kez skeventad anrizehek tredizhus kenan zo emledet ent darreuziadek ha goude ent vedreuziadek adalek Sina e Meurzh 2003 betek Genver 2004.

SÂT ◇ **SÂT** ◇ **SÂT** Arouez an tredanahel keitad T durc'haet en egor ha n'eo ket mui bannet war ur blaenenn a-dal.

Satchmo : **syndrome de** ~ ◇ **Satchmo's syndrome** ◇ **azoniad g. Satchmo** Freg kigenn gelc'hennek ar genoù arsellet gant ar sonerion binvioù dre c'hwezh a vicher, an drompilherion pergen.

satellite ◇ **satellite** ◇ **1 amdiriat** aa. **2 kevelat** aa. 1 A-zivout ur wazhienn nes d'un dalmerenn hed-ha-hed dezhi, alies gant an un anv. Dre astenn ster, a-zivout an tiriad nes d'un organ. Graet e vez neuze gant *amdiriad* er ster-se. 2 A-zivout ul luniad korfadurel nes d'unan all ha damleñvel outi, pe en e diazalc'h.

Satoyoshi : **syndrome de** ~ ◇ **Satoyoshi's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Satoyoshi** Kevreded dibaot arsellet e Japan barradoù glazou, ezreolderioù ardalpennel liesel ha diwaoutad.

Sattler : **voile de** ~ ◇ **Sattler's veil** ◇ **gouel** b. **Sattler** Gouliñv ar gornsae devoudet gant gorreferennoù amazas o tispisaat ar gweled.

saturnin ◇ **saturnine** ◇ **plomel** aa. A-zave d'ar plom pe d'ar c'hediadoù anezhañ.

saturnisme ◇ **lead poisoning** ◇ **plomegezh** b. Pistriadur gant ar plom pe an haliou plom. — ar *blomegezh lemm* a zevoud laurioù kof grizias (gwentloù plomel), kevret gant ur goustivadur. — ar *blomegezh henek* (Sz. *saturnism*) a erzerc'h dre strafuilhoù nerval dreist holl (krenerezh, peluz, empennaoued), dre ul lounezhad entremezel, en ervez da zisoc'h d'ar fallezh plomel ha d'ar marv (sl. *Burton* : *liseré de* ~, *plomb*, *porphyrie*, *déclaration obligatoire* : *maladies à* ~, *plombémie*).

satyriasis ◇ **satyriasis** ◇ **satiriaziz** g. Uc'horged pe reñver ar c'hoant revel gant an gourev.

sauna ◇ **sauna** ◇ **saona** g. -où Termen a orin suomat, ur seurt dourgurañ e-barzh ur stoufaihl — anvet ivez *saona* —, ma kemer ar gouzrec'h a bep eil kouronkoù aer domm ha sec'h, kouronkoù burezh ha strinkadennoù dour yen pe domm.

sauvegarde de justice ◇ **judicial protection** ◇ **gwared** g. **gwirel** Hanren gwareziñ an angougeion vuiek azasaet ouzh plegennoù eizik bevennet en amzer pe ouzh degouezh an hiniennou gwanaet o galloudezhioù bredel, nad int ket neoazh dic'houest da verañ o aferioù. Mirout a ra ar gouzrec'h embreg e wirioù; c'hoarvezout a ra ar gwarezerezh eus keinadoù lusket *a-zianouez* evit lakaat daskemmañ pe vannelaat aktaoù en defe sinet ar gouzrec'h enep e lazioù.

Savariaud : **signe de** ~ ◇ **arouez** b. **Savariaud** Arouez oc'h erzerc'haat laoskegezh ezreol ar pourc'had kenvell gant ar vagadelled kenttuet da zisvellad al lez : berradur an ezel traoñ, anat er gourvez a-gein, a gresk pa lakaer ar bugel en e goazez, e c'har astennet war e vorzhed.

Savin : **syndrome de** ~ ◇ **azoniad** g. **Savin** Azoniad hêrezhel treuzkaset ent trevennevel, o naouiñ dre gevreded anezioù ar gornsae (tevaennoù nozelek ha graspadou), iktioz hag erzerc'hadoù allergek.

savon ◇ **soap** ◇ **soavon** g. Nep hal trenkenn druz. O rannañ a reer e daou rizh : ar soavonoù hezileizh (diziblerioù) aozet gant metalioù alkaliek evel an natriom pe ar c'haliom, hag ar soavonoù amzeizh, haliou trenkennoù druz ha metalioù div- pe teiramsavus.

SBS 11 ou **Sulfates Butylo Solubles** ◇ ◇ **SBH 11** pe **sulfatoù butilohezileizh** Rann sulfokeveilet an hormonoù steroidel douhennet gant an *n*-butanol, en ur metoù alkaliek (pH 11), eus an ezvevennadoù troazhel. Bez' ez eus enni un danvezenn c'h-ouevus ha reoù 'zo eus ar 17-ketosteroidoù. Ezvevennadur reol dre an troazh an SBH 11 zo 15, 5 mg dre 24 h gant ar gwaz ha 8 mg dre 24 h gant ar vaouez.

scabieux ◇ **scabious** ◇ **hakrezel** aa. A-zave d'an hakrez.

scalène ◇ **scalene** ◇ **skeuliek** aa. A-zivout kigennoù don ar rannbarzh raogkostezel ar gouzoug (kigennoù skeuliek araoek, krenn hag adreñv), astennet a-veskell eus mellennoù ar gouzoug betek an div gostenn gentañ; adenanalerioù o vezañ uhelaerioù an div gostenn-se ez int ivez plegerioù kostezel ar penn.

scalène antérieur : **syndrome du** ~ ◇ **anterior scalene syndrome, thoracic outlet syndrome**) ◇ **azoniad** g. **ar gigenn skeuliek araoek** Teskad an azonou diwar tanaill pe amwask an dalmerenn endan-drebez pe gwrizenioù izelañ plezhad ar vrec'h gant ur gostenn c'houzoug pe gant ar strizhenn etre ar gostenn gentañ hag ar gigenn skeuliek araoek reut ent ezreol, anezho kaouadoù grezvarrek lec'hiet en dorn hag en arvrec'h, o c'hoarvezout e-pad an noz dreist holl, pe wazhiedloc'hadel (azoniad Raynaud), pe laurus (kammeraez ar bleñchoù). Darvezout a ra an erzerc'hadoù nerval ha gwazhiedloc'h e lakadurioù 'zo ar skoaz, o lakaat war steg gwazhied ha gwrizenioù plezhad ar vrec'h war vos ar c'hostoù (Gl. *chevalet costal* Sz. *costal hump*).

scalénotomie ◇ **scalenotomy** ◇ **skeuliegenbenañ** Skejañ ar c'higennoù skeuliek araoek hag adreñv diouzh un tu; gwezhiadenn amkanet da glokaat gwered ar c'helc'hspereunnezvenañ ha da ziloc'hekaat penn da benn an hantervrusk. Skejañ ar gigenn skeuliek araoek a vez ret a-wechoù da lemel kaouadoù grezvarrek azoniad ar gigenn skeuliek araoek.

scalp ◇ **scalp** ◇ **skalp** g. -où Ar vrigenn dichontret a-zarvoud.

scalpel ◇ **scalpel** ◇ **erc'hel** g. -où (sl. *bistouri*).

scanner ◇ **scanner** ◇ **skanner** g. -ioù Ardivink dezhañ neuz ur gorzenn arveret er skinimbourc'h. Skinoù X hesteudet hag o c'hwilerviñ an organ arsellet "a-skejadoù" zo muzuliet gant enankerioù kennasket ouzh un urzhiataer, a jed ar gwezhiaderioù lugañ kevarall, pezh a gevaraez gounit skeudenn gloc pep skejad kenheuilh a-dreuz eus rannbarzh ar c'horf imbourc'het.

scanographie ◇ **scanography** ◇ **c'hwilerluniñ**; **skinerluniñ**; **-erluniñ** Kalvezerezh skindeznaouiñ a c'hoarvez a geweriañ dre urzhiataer ar stennadoù pourchaset gant ar skinoù X. Ar skinoù, hesteudet e hordennoù strizh kenan hag o c'hwilerviñ an organ arsellet a-skejadoù, zo muzuliet gant enankerioù kennasket ouzh un urzhiataer a jed gwezhiaderioù lugañ kevarall ar gwiadoù, a dalvez da adsavelañ skeudennoù a skejadoù fin. An dedalvezadur kentañ zo bet erc'hwilierezh ar c'hloppenn hag an empenn, ha goude ez eo bet astennet ar c'halvezerezh-se d'ar c'horf a-bezh (sl. *tomodensitométrie*).

scanographie hélicoïdale ou **spiralee** ◇ **spiral computerized tomography** ◇ **c'hwilerluniñ ulidek** C'hweladur kendalc'hek mammenn ar skinoù X, kevredet gant dilec'hiadur linennek ar gouziviad, a gevaraez adsavelañ ur skeudenn deirment.

- scansion** ◇ **scanning, scansion** ◇ **skoata** Strafuilh an deluzañ, anezhañ dispartiañ silabenoù pep ger.
- scaphocéphalie** ◇ **scaphocephalism** ◇ **louebennegezh** b. Kammneuziad ar c'hloppenn naouus dre strizhder hag ushed a-saezh ar c'hloppenn, diwar un askornaat rakkoulz a 'r vellez a-saezh.
- scaphoïde** ◇ **scaphoid** ◇ **1 skafek** aa. **2 skafeg** g. **3 bulzuneg** g. 1 E stumm ur skaf, sk. *poull skafek* (Gl. *fossette scaphoïde*). 2 Gl. *Scaphoïde carpien*. 3 Gl. *Scaphoïde tarsien, os naviculaire*.
- scaphoïde tarsien : syndrome du ~** ◇ **scaphoid** ◇ **azoniad** g. **ar bulzuneg** Anaf askornarzel (askornarzel navel) lec'hiet er bulzuneg. Arsellet e vez a-wechoù e-kerz an diabet c'hwek. Anadiñ a ra gant ar gouziviad un dirazekadur a 'r bulzuneg, gant kleuzennoù o tiwanañ. Ar c'hleñved a c'hell dedreiñ trema dinod torrou ha difloskadur an adeiladeg askornel. Emañ an anafoù en ervez da emastenn d'an arzoù ha d'an eskern nes. En degouezh-se ez eus gant ar gouziviad un troad dezhañ neuz un diñs, heñvel ouzh un troad tabezel (kleñved an troad o tarvezout e-kerz an tabez).
- scaphoïdite** ◇ **scaphoiditis** ◇ **1 skafegfo** b. **2 bulzunegfo** g. 1 Tanijenn ar skafeg. 2 Tanijenn ar bulzuneg (sl. *Köhler : maladies de ~*).
- scapholisthésis** ◇ **skafolisteziz** g. Bulzunegfo an oadour, ma emrann an askorn e daou damm o riklañ war gostez.
- scapula** ◇ **scapula** ◇ **planken** g. **skoaz** (sl. *omoplate*).
- scapulae alatae** ◇ **winged scapulae** ◇ **plankenou skoaz askellek** Plankenou skoaz distaget diouzh ar brusk diwar isteñv ar c'higennoù a zo ouzh o derc'hel arloet war an divskoaz, ar c'higennoù karavek pergen.
- scapulalgie** ◇ **scapulargia** ◇ **skoazost** b. Laur lec'hiet e rannbarzh ar skoaz.
- scapulectomie** ◇ **scapulectomy** ◇ **plankenezvenañ** Dilemel ar planken skoaz a-zarn pe a-bezh.
- scapulo-huméral** ◇ **scapulohumeral** ◇ **skoaz-paler** aa. A-zave d'ar planken skoaz ha d'ar paler.
- scapulo-thoracique** ◇ **scapulothoracic** ◇ **planken-brusk** aa. A-zave d'ar planken skoaz ha d'ar brusk.
- scarification** ◇ **scarification** ◇ **skarigañ, araskañ** Flañchadennoù bas graet gant un erc'hel, ul lañsetez pe ur skariger, amkanet da zac'h an ur gwadad lec'hiek, pe da enkoriñ ur vaksin.
- scarlatine** ◇ **scarlet fever** ◇ **skarlegenn** b. Pore dispuilhat, tredizhus ha darreuziat, diwar strepokok gwadloezus a 'r stroll A, *Streptococcus pyogenes*. Kregiñ a ra gant kridiennoù, terzhienn, droug gouzoug gant gorank, un enantem genaouel ha gargadennel; goude e tinod un eksantem hollek skarlek, ha, war-lerc'h, ur gourc'hennadur feilhennek. An dedro a bad etre div ha teir sizhun en degouezhioù azoù, ar vulgale o vezañ tizhet peurgetket. Ar rouestlad ar paoñ a vez al lounezhus. An erbedad zo bet treuzfurmet gant ar bevastalgurañ, ar penikilin dreist holl.
- scarlatiniforme** ◇ **scarlatiniform** ◇ **skarlegvanek** aa. Heñvel ouzh ar skarlegenn.
- scarlatinoïde métadiphthérique** ◇ **metadiphtheric scarlatinoid** ◇ **skarlegvan** g. **metadifterek** Dispuilhad gant terzhienn dezhañ holl erzerc'hadoù ar skarlegenn hag a vez arsellet a-wechoù e souzvezh an difteriezh. Liammet da gentañ ouzh darvoudoù ar gwadveizkurañ, e vez sellet bremañ an anaerz-se gant kalz aozourion evel ur skarlegenn wirion.
- Scarpa : entonnoir membraneux ou infundibulum de ~** ◇ **founilh** g. **Scarpa** Kavenn amparet e deun igorenn un adfraezh anafel dre angrizadur argammedek ar gentrenn, o kevarezañ d'an oulennoù tremen war-eeun eus penn ar pervez degasat er penn ezkasat.
- Scarpa : triangle de ~** ◇ **Scarpa's triangle** ◇ **tric'hogn** g. **ar vorzhed** Rannbarzh korfadurel loet e talbenn arak ar vorzhed, bevennet en nec'h gant ar stagell c'heneh-barlenn, war ziabarzh gant ar gigenn nesaer krenn, war ziavaez gant ar gigenn gemener ha treuzet gant ar gwazhied morzhed hag an nervenn vorzhed dreist holl.
- SCC** ◇ **Squamous Cell Carcinoma** ◇ **SCC; antigen karkinom gouzoug ar grozh gant kelligoù liac'hek** Antigen kevredet gant karkinom gouzoug ar grozh gant kelligoù liac'hek, arveret hepken evit eveshaat an dedro anezhañ.
- Schafer : méthode de ~** ◇ **Schafer's method** ◇ **hentenn** b. **Schafer** Hentenn wenterezh kalvezadel : an deborzher, a-c'haoliad war loan ar mouged (a zo war e gof), a wask reoliek gant palvoù e zaou zorn war ar c'hostoù izelañ, bep pemp eilenn.
- Schäfer : syndrome de ~** ◇ **Schäfer's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Schäfer** Hiperkeratoz ganedigel hêrezhel treuzkaset er mod trec'hek, kevredet gant strafuilhoù bred.
- Schaffer : signe de ~** ◇ **Schaffer's reflex** ◇ **arouez** b. **Schaffer** Astennidigezh ar meud troad dre biñsañ stirenn ar seul, azonus d'un anaf er stirad pikermennek.
- Schamberg : maladie de ~** ◇ **Schamberg's dermatosis** ◇ **kleñved** g. **Schamberg** Kroc'henad naouus dre vezañs war an izili traoñ eus plakennoù purpurek ha livegennek, pikoù ruz strewet war an trobarzh anezho.
- Schatzki et Gary : anneau de ~** ◇ **Schatzki's ring** ◇ **gwalenn** b. **Schatzki ha Gary** Strishaenn glaourgen an treizher a-us d'un aveleñ c'hremel.
- Schaudinn : tréponème de ~** ◇ **Schaudinn's bacillus** ◇ **treponem** s. **Schaudinn** *Treponema pallidum*, gwezher spesadel ar sifiliz, desellet da gentañ evel spiroket.
- Scheie : maladie ou syndrome de ~** ◇ **Scheie's syndrome** ◇ **azoniad** pe **kleñved** g. **Scheie** Anaerz a denn da gleñved Hurler, o tiforc'hiñ dioutañ dre an ezvezañs a zilerc'h bred. Dec'honet e vez gant divig un enzim, an α -L-iduronidaz. Treuzkaset eo er mod aotozomek enkilek.

- schéma** ◇ **schema** ◇ **goulun g. -ioù** Kevregad o terc'hennañ en un doare eeunaet staladur un organ pe un ardivink.
- schéma corporel** ◇ **body image** ◇ **goulun emgorf** Derc'had en deus ar gouzrec'h eus e gorf e unan
- schème** ◇ **schema** ◇ **goulun** Luniad hollek un ergorenn, un argerzh.
- Schick** : **réaction de ~** ◇ **Schick's test** ◇ **prouad g. Schick** Prouad endermel embreget gant an toksin difterek, yaek e degouezh darbennusted ouzh an difteriezh. Pa vez nac'hek e talvez ez eo hangaet ar bevedeg. Da geñver un darreuziad e kevarvez bevennañ an ensinklañ dizarbenn d'an degouezhioù yaek hepken.
- Schiller** : **test de ~** ◇ **Schiller's test** ◇ **prouad g. Schiller** Araezad diurnat kankr gouzoug ar grozh. Epitelienn vonan ar grozh a vez livet e gell pa vez arloet outi an dileizhenn Lugol, dre zazgwered an kez dileizhenn gant ar glikogen endalc'het er c'helligoù epitelel; ar glaourgenn hanweek, o vezañ hep glikogen, ne zazgwered ket gant al Lugol ha chom a ra arwenn enta.
- Schilling** : **test de ~** ◇ **Schilling's test** ◇ **prouad g. Schilling** Prouad amkanet da imboure'hiñ kennevid ar vitamin B₁₂, dre arverañ an kez vitamin tiellet gant ar c'hobalt skinoberiek. Yaek e vez ar prouad en amwad Biermer pe e degouezh misug spesadek ar vitamin B₁₂.
- Schimmelbusch** : **maladie de ~** ◇ **Schimmelbusch's disease** ◇ **kleñved g. Schimmelbusch** (sl. *kystique* : *maladie* ~).
- Schinzel** : **syndromes de ~** ◇ **Schinzel's syndromes** ◇ **azoniadoù Schinzel** Anvad roet da lies azoniad kammneuziadel nemedennek gant dilerc'h bred hag isganadegzh.
- Schinzel-Giedion** : **syndrome de ~** ◇ **Schinzel-Giedion's syndrome** ◇ **azoniad g. Schinzel-Giedion** Teskad dibaot a gammneuziadoù dezho, dreist holl, un angrizad muiiek eus lodenn grenn an dremm, lies ezreolder klopennel, treid potin, kammneuziadoù lounezhel ha kalonel hag ivez un dilerc'h bred muiiek. Treuzkaset e ve er mod aotozomek enkilek.
- Schirmer** : **épreuve de ~** ◇ **Schirmer's test** ◇ **prouad g. Schirmer** Hentenn da andañ borc'hidigezh an daeroù diwar-bouez paper splu arloet en ank diabarzh al lagad.
- Schirmer** : **syndrome de ~** ◇ **Schirmer's syndrome** ◇ **azoniad g. Schirmer** Askenad azoniad Sturege-Weber-Krabbe, kevredet kenrat gant glaokom ha lagadfoeñv.
- schistose** ◇ **schistosis** ◇ **skistoz g.** Analeuflegezh kuñv diwar zewentadur uloc'h sklent.
- Schistosoma hæmatobium** ◇ **Schistosoma hæmatobium** ◇ **Schistosoma hæmatobium** Spesad arvevaded unrev eus urzhad an Trematod, 12 mm hed, a drebarzh korf an den dre ar c'hroc'hen e-kerz ur gouronkadenn, o vont da spegañ a-ziuz en organoù kleuz, er c'hwezhi-gell pergen. Evit aozerion all e ve euvret ar *S.* en o stad larvel gant an dourioù evañ. Ar vioù, dezho ur beg lemm, a zevoud anafoù grevus en organoù, ma vezont kaset gant red ar gwad (bilarzioz ar c'hwezhi-gell).
- schistosome** ◇ **1 schistosomus 2 schistosoma** ◇ **1 skistozom g. -ed 2 skistozom s.** 1 Krouell euzhek naouus dre un toull en he c'hof. Ezvezant pe grakelfennel e vez an izili traoñ, ar peurliesañ. 2 Arvevad eus ar genad *Schistosoma*.
- schistosomiase** ◇ **schistosomiasis** ◇ **skistozomiaz g.** Kleñved arvevadel, broreuziat e rannbarzhioù 'zo (Afrika, Suamerika, Azia), devoudet gant preñved eus ar genad *Schistosoma* (heñvelster : *bilarzioz*).
- schistosomiase artérioveineuse** ◇ **asiatic schistosomiasis** ◇ **skistozomiaz talmerenn-gwazienn** Anvet ivez *skistozomiaz sinaat-japanat* (*aziat*) pe *kleñved Katayama*, devoudet gant *Schistosoma japonicum*, naouus dre ur stad pistriboreel grevus, un eleozinofil, un azoniad dizenterek, un avufelc'husvent ha torliñv.
- schistosomiase intestinale** ◇ **intestinal schistosomiasis** ◇ **skistozomiaz pervez** Anvet ivez *skistozomiaz Manson*, devoudet gant *Schistosoma mansoni*, naouus dre un tizhad avu ha pervez.
- schistosomiase urinaire** ◇ **urinary schistosomiasis** ◇ **skistozomiaz troazhadel** Anvet ivez *skistozomiaz c'hwezhi-gell*, pe c'hoazh *skistozomiaz Egipt*, devoudet gant *Schistosoma haematobium*, naouus dre strafuilhoù troazhadel, grevus alies ha dre un droazhwadegzh.
- schizamnios** ◇ **schizamnion** ◇ **skizamnion g.** Furmadur kavenn an amnion dre gavenniñ.
- schizocéphale** ◇ **schizocephalus** ◇ **skarbenneg g. -eion** Krouell euzhek a zo he fenn rannet gant ur skarr diahed.
- schizocyte** ◇ **schizocyte** ◇ **skizokit s.** Rannigoù arsellet er gwad diwar bruzunadur an hemati.
- schizocytose** ◇ **schizocytosis** ◇ **skizokitoz g.** Bezañs er gwad eus skizokit.
- schizogonie** ◇ **schizogony** ◇ **skizogoniezh b.** Anvet ivez *kor skizogonek* (Gl. *cycle schizogonique*), eleze kor gouennañ anrevl arvevaded ar baludegzh.
- schizoïdie** ◇ **schizoïdia** ◇ **skizoidiezh b.** Neuzid kleñvedel dezverket gant un tuadur d'an emc'hwiliañ, un emdenn kedvuhez, gant diaesterioù da emazasaat ha realoù darluskek ha diazas. Erzerc'haat a rafe ur strafuilh eus ar bersonelezh, deskrivet gant Kretschmer, piaouel d'ar c'houziviaded asikek pe venstumm.
- schizomanie** ◇ **schizomania** ◇ **skizomania g.** Termen kenradet gant H. Claude o teanviñ koll ar c'halloudezh d'emazasaat ouzh an amveziadoù, gouzañvet gant hiniennoù 'zo, skizoidel o genezh, da-geñver diaesterioù kantaezel pe ur pistriboread.
- schizomélie** ◇ **schizomelia** ◇ **gaolezelegezh b.** Dizoubladur parzh pellek un ezel.
- Schizomycètes** ◇ **Schizomycetes** ◇ **Skizomiket s.** Heñvelster gant *bakteri* (sl. *bactérie, procaryote*).
- schizonoïa** ◇ **schizonaia** ◇ **skizonoia g.** Tuadur hollek d'an disklot.

schizonte ◇ **schizont** ◇ **skizont** g. -où Furm enkelligel arvevaded ar baludegezh, o neriñ dre emrannañ anrevel, pe er gwiadoù, pe en eritrokit.

schizonticide ◇ **schizonticide** ◇ **1 skizontlazh** aa. **2 skizontlazer** g. -ioù **1** Gant ar perzh lazhañ ar skizontoù. **2** Lia skizontlazh.

schizophasie ◇ **schizophasia** ◇ **skizofaziezh** b. Ezluzañ digomprenadus ha dizurzh dre zeluzañ gammgomzoù ha brizhc'herioù, alies gant ur c'hellusk herrek kenan, arsellet gant ar skizofren.

schizophrène ◇ **schizophreniac** ◇ **skizofren** g. -ed Klañvour tizhet gant ar skizofreniezh.

schizophrénie ◇ **schizophrenia** ◇ **skizofreniezh** b. Termen¹ goveliet gant Bleuler e 1911 da arouezañ ur rumm psikoziou bet savelet endeo gant Kraepelin dindan an anvad *dementia praecox* ("envedi genrat") ha deskrivet hervez teir furm chomet klasel : hebefrennek, katatonek, paranoidel.

O tegas an anvad skizofreniezh (Gr. σχίζω "skejañ, faoutañ" ha φρήν "spered"), e felle da Bleuler lakaat war wel an azon pennañ eus ar psikoziou-se : ar *Spaltung* ("distroll, disfaout"). Degemeret eo bet ar ger gant ar vredvezeion hag ar vredelfennerion, forzh pe zianglevioù a ve da du 'rall etre an aozerion a-zivout ar sol da reiñ da spesadegezh ar c'hleñved hag ar stern nozografek d'e renkañ.

Niverus eo furmoù klinikel ar skizofreniezh. Boutin eo etrezo avat an doareoù-mañ : dislen en devezout, er realañ hag er c'hantaezañ (azon a lakaer warnañ an anvadoù : disklot, distroll, disfaout), an emdroc'h diouzh ar werc'helezh, an emdenn hag an embac'hadur en dedaoladoù eriuñnek (aotegezh), ur realañ ambreek amreizhiadek. Ur c'hleñved henek eo, oc'h emdreiñ etrezek an disleberadur eus ar bred (meizañ, kantaezañ ha gwerc'hañ) hag an envedi, — an doare-mañ diwezhañ, sellet evel dezverkus gant an aozerion glasel, n'en deus ket mui ar pouez en doa ganto abaoe ma vezeger ar skizofrened gant an neuroleptier ha ma roer dezho an tu da gerner perzh efedus er gedvuhez en-dro.

Ar *Spaltung* skizofrenek oa nesadet gant Bleuler ouzh ar pezh a zeskrive Freud dindan an hevelep anvad evel merk an diemouez, an trebaderzh kichen-ha-kichen eus gronnadoù derc'hadoù dizalc'h. Evit Bleuler avat ez eo ar *Spaltung* eilvedel d'un divigad a zo ur gwir zispenn eus an argerzhioù bred. E-se e teskriv daou lankad d'ar *Spaltung* : un diflosk kentael (*Zerspaltung*), dibarfrezadur eus ar bred, hag an distroll pe disfaout (*Spaltung* er ster strizh), c'hoaladur an devezout e gronnadoù distag.

schizoprosopie ◇ **schizoprosopia** ◇ **skizoprozopiezh** b. Kammneuziad klopenndremmel ganedigel o naouiñ dre un andlid eus an dremm en he fezh pe dost, diwar ur skarr e doare ur boulc'h, o kenderc'hel war grec'h.

schizose ◇ **schizosis** ◇ **skizoz** g. Termen goveliet gant H. Claude evit dezanniñ an daralladoù bred ma sour an aotegezh.

schizothorax ◇ **schizothorax** ◇ **skizotoraks** g. Skarr ganedigel diahed speur ar brusk.

Schlemm : **canal de** ~ ◇ **Schlemm's canal** ◇ **god** g. **gwazhiennel al lersae** Gwazhienn walennek loet e-kichen ribl araok al lersae, en ank kanevedenn-kornsae o teoueriañ dourenn al lagad.

Schmidt : **syndromes de** ~ ◇ **Schmidt's syndromes** ◇ **azoniadoù Schmidt** **1** Azoniad dastuat hirvelel o naouiñ dre gevreted ur gouseizi a-gendu eus ar gouel stavn hag eus pleg ar vouezh, gant ur seizi eus ar gigenn glerenn-trebez-brennigenn hag eus ar gigenn dristuriek. **2** Azoniad o naouiñ dre gevreted ur skorted skoedennel gant ur c'hleñved Addison hep strafuilhou gougorfennel, dianav e arbenn.

Schmincke : **tumeur de** ~ ◇ **Schmincke's tumor** ◇ **yoc'henn** b. **Schmincke** Limfoepiteliom dispaket diwar goust gwriad gargadennel gwalenn an huegoù (anvet ivez gwalenn Waldeyer), oc'h aloubiñ diaz ar c'hloppenn.

Schmorl : **nodule de** ~ ◇ **Schmorl's nodule** ◇ **nozeleñ** b. **Schmorl** Seurtad diskogad ma ento ar gronn bouedennek, ezvountet war raok, er c'horf mellenn.

Schneeberg : **test de** ~ ◇ ◇ **prouad** g. **Schneeberg** Studi an troazhvec'h devoudet dre ensinklañ endan-groc'henn 10 unanenn douhennad drekgougorfenn.

Schnitzler : **syndrome de** ~ ◇ **Schnitzler's syndrome** ◇ **Azoniad** g. **Schnitzler** Kevreted ul linadell henek gant gwazhiedfo hag ur globulinwadvivec'h monoklonel IgM (sl. *macroglobulinémie*).

Schnyder : **dystrophie cristalline de la cornée de** ~ ◇ **Schnyder's dystrophy** ◇ **mideñv** g. ar **gornsae Schnyder**, **mideñv strinkennak ar gornsae** Kammneuziad hêrezhel ha familhel ar gornsae, treuzkaset er mod trec'hek aotozomek, oc'h erzierc'hañ kenrat. Ganedigel a-wechoù ez eo naouus dre un demerâd kreiz e stumm ur gantenn, loet e trederenn araok ar gornsae, amparet gant strinkenoù a natur lipidel.

Schober : **épreuve de** ~ ◇ ◇ **prouad** g. **Schober** Prouad amkanet da andalañ oueskded al livenn gein. War ar gouzrec'h en e sav e vuzulier an esaou etre daou spislec'h kreizer, unan war baleg spernennek L5, egile 10 cm uheloc'h, ha goude an hiradur etre an daou spislec'h-se el loadur a plegadur araok uc'hek : ent reol e vuzulier 5 cm. Un hiradur bihanoc'h a ya a-du gant dezaou ar mellennarzfo.

Scholz-Greenfield : **maladie de** ~ ◇ **Scholz-Greenfield disease** ◇ **kleñved** g. **Scholz-Greenfield** Lipidoz an nervedg kreiz, hêrezhel ha treuzkaset er mod aotozomek enkilek, diwar ezvezañs un enzym, an arilsulfataz A. Taolenn un empennaoued goulemm argreskus o tedeññ etrezek ar marv war-dro an oad a 4 bloaz, a-zalc'h gant un hogennadur sulfatidoù en nervreizhiad. Anv zo eus ur gwennvideñv.

¹ Guy Étienne, *Geriadur ar Bredelfennerezh*, Preder, 1983, p. 291

- Schrøder** : **syndrome de** ~ ◇ **Schrøder's syndrome** ◇ **azoniad g. Schrøder** Mizanliñv, gant uswe gwagrennel-kistel glaourgenn ar grozh, diwar usvorc'h estron gant ur volc'henn vierrez dreistpadek ha kistek.
- Schroth** : **méthode de** ~ ◇ **Schroth's method** ◇ **hentenn b. Schroth** Kalvezder leuñviñ analadel en erdu ar rakwareion.
- Schuchardt et Schauta** : **opération de** ~ ◇ **Schuchardt's operation** ◇ **oberatadenn b. Schuchardt ha Schauta** Gouinkrozhezvenañ gouinel evit kankr gouzoug ar grozh.
- Schüller** : **maladie de** ~ ◇ **Schüller's disease** ◇ **kleñved g. Schüller** Osteoporoz laurus kantet er c'hlopenn e-doug kleñved Paget.
- Schüller-Christian** : **maladie de** ~ ◇ **Hand-Schüller-Christian disease** ◇ **kleñved g. Schüller-Christian** Furm hollekaet an histiokitoz X o tizhout ar vugale yaouank ; gant an anaev-se e vez kevret : loezennoù eskern ar c'hlopenn, un avufelc'husvent, un diabet heuz gant korreded. Bez' ez eus un usvec'h kolesterol en histiokit.
- Schwabach** : **épreuve de** ~ ◇ **Schwabach's test** ◇ **prouad g. Schwabach** Prouad a c'hoarvez a vuzuliañ merzhvezh klevedel un tonreizher, hervez ma vez merzhet dre an hent aere pe dre an hent askornel. E degouezh a anaf a 'r skouarn diabarzh, ar merzhvezh askornel a vez bihanaet (Schwabach berraet) ; e degouezh a anaf a 'r skouarn grenn e vez hiraet (Schwabach hiraet).
- Schwachman** : **syndrome de** ~ ◇ **Schwachman's syndrome** ◇ **azoniad g. Schwachman** Kevreted ur skorted ezvorc'hadel a 'n ilgreiz, un olneutrofil gant skorted ar mel eskern hag ur goulerc'h kreskiñ. Bec'h an natriom er c'hwez hag er skevent a vez ezreol, e kemm ouzh ar mukoviskidoz.
- Schwann** : **gaine de** ~ ◇ **Schwann's sheath, neurilemma** ◇ **feur b. Schwann** Anvet ivez *neurolemm*, gwiskad gwareziñ loet e diavaez feur vielin an nervwiennoù empennelel.
- schwannite** ◇ **schwannitis** ◇ **fo g. feur Schwann ; chwannfo** tanijern feur Schwann an nervennoù.
- schwannomatose** ◇ **multiple schwannoma** ◇ **chwannomatoz g.** Bezañs neurinomoù liesel war skourroù an nervennoù trobarzh.
- schwannome** ◇ **schwannoma** ◇ **chwannom g.** (sl. *neurinome*).
- Schwartz** : **signe de** ~ ◇ **Schwartz's test** ◇ **arouez b. Schwartz** Treuzkas a-bell, a-hed ur wazhienn deuc'hellek, ur wagenn liñvel, devoudet gant ur chifrodenn ouzh an teuc'helloù brasañ ; ar proud-se a gevaraez imboure'h glennadur ar rouedad teuc'helloù. Dewerc'het e vez ivez an treuzkas a-gilred, mard eo skod an trapigoù.
- Schwartz-Bartter** : **pseudo-syndrome de** ~ ◇ ◇ **gaouazoniad b. Schwartz-Bartter** Azoniad borc'hadur diazas hormon eneptraosheiat, nad eo ket lezhanweel an orin anezhañ, e gin an azoniad Schwartz-Bartter.
- Schwartz-Bartter** : **syndrome de** ~ ◇ **Schwartz-Bartter syndrome** ◇ **azoniad b. Schwartz-Bartter** Anvet ivez SIADH (*Sz. syndrome of inappropriate antidiuretic hormone secretion*), Br. *azoniad borc'hadur diazas hormon eneptraosheiat*, un azoniad lezhanweel enborc'hadel oc'h erzerc'haat un usvorc'h hormon eneptraosheiat, arsellet dreist holl gant ar c'houziviaded tizhet gant kankr ar bronkez kelligoù bihan.
- Schwartz-Jampel** : **syndrome de** ~ ◇ **Schwartz-Jampel syndrome** ◇ **azoniad b. Schwartz-Jampel** Anaev hêrezhel naouus dre gevreted ur malvennamgul pe ur malvennandag hag ur c'habernaoued hollekaet, oc'h erzerc'hañ dre ur c'haberisteñv hag ur viontezh, gant reuterioù kaherel, enebrezh sonnet, bihanded ar vent, bruske evnek.
- sciage** ◇ **sawing** ◇ **heskenañ** Hentenn leuñviñ graet gant ribl an dorn dre fiñvoù monedone.
- Scialytique**® ◇ **scialitik g.** ardivink goulaouiñ ar vaezienn operata ergrafet evit ezvevennañ ar skeudoù bannet.
- sciatalgie** ◇ **sciatica** ◇ **nevost b. a-goazez** Nervost a-goazez.
- sciatique** ◇ **1 sciatic 2 sciatica** ◇ **1 a-goazez aa. 2 navigamm g.** 1 A-zave d'al lez. 2 Tanijern pe amwask laurus an nervenn a-goazez, naouus dre gammeraezioù a 'r vorzhed hag a 'r c'har, en ervez da dizhout an troad, dre vezañs poentoù laurus war dreug an nervenn hag a-wechoù dre un isteñv kaherel. Al laur grizias kenan sezet war dreug an nervenn a vez delanket gant ar bec'hiañ, o kriziezañ gant ar paz pe pa blegar war al lestr an ezel traoñ war astenn (arouez Lasègue). An arbenn paoañ a vez ar c'henniñv etre gwriziennoù L5 hag S1 hag an disk etre-melloù keñverek.
- scintigraphie** ◇ **scintigraphy** ◇ **skingannluniñ** Hentenn skeudennerezh mezegel, anezhi ensinklañ, ent engwazhiedennel ar peurliesañ, un dileizhenn enni un danvezenn skinoberiek o lenañ a-ziuz ouzh an organ (pe ar gwiaed) arsellet, ha goude lerc'hwezañ diwar-bouez un dinoer arbennik (skingannluner) dasparzh glennadel ar skinoberiegezh e parzhioù ketep an organ. Ar skingannlunad gounezet en doare-se a anad e rezh ur steudad pikoù o savelañ o tachadoù o deus delenet an danvezenn skinoberiek. An argerzhad-se a gevaraez savelañ pe resizañ sez ha ment ar furmadoù anvonan diseurt er parenkim (kistoù, nozelennoù, pugnezoù, yoc'henoù, h.a.), pe andalañ stad arc'hwelel un organ. Arveret e vez dreist holl evit imboure'hiñ ar skoedenn, an avu, al lounezhi, ar galon, ar skevent, an empenn (sl. *gammagraphie*).
- scintigraphie myocardique** ◇ **myocardial scintigraphy** ◇ **skingannluniñ ar c'halongaher** Lenadur ur skinizotop (taliom pe teknetiom) ouzh kaher ar galon war-benn imboure'hiñ ar gwazhiedadur kurunerel.
- scintigraphie pulmonaire** ◇ **pulmonary scintigraphy** ◇ **skingannluniñ ar skevent** Lenadur ur skinizotop (korrannigoù teknetiom 99 er skingannluniñ dre ensinklañ, ksenon 133 er skingannluniñ dre zewentañ) evit deznaou an enfroù skevent.
- scissure** ◇ **scissura** ◇ **1 nant g. 2 skarr g.** 1 Kevatal da La. *sulcus*, eleze un ervenn war c'horre un organ. 2 Kevatal da La. *fissura*, eleze ur grouzenn hir ha strizh o tispartañ div dolbezenn un organ (empenn, skevent, avu).

scissurite ◇ **interlobar pleuritis** ◇ **skarrfo** g. Krezennfo sezet en ur skarr etre tolbezennoù skevent, dinoet alies goude ar pare war ur skinlun a 'r skevent dre vezañs ul linenn demer a-hed treug ur skarr.

scIéral ◇ **sclerel** ◇ **lersaeel** aa. A-zave d'al lersae.

sclère ◇ **sclera** ◇ **lersae** b. Lodenn adreñv demer eus kennenn diavaez stirek ha gwevn boull al lagad. Kenderc'hel a ra war raok gant ar gornsae a zo treuzwelus.

sclérectasie ◇ **sclerectasia** ◇ **lersaeusvoll** g. Dardennadur pe volc'hadur ul lodenn eus al lersae, o tevoudañ un ogad anezhi.

sclérectomie ◇ **sclerectomy** ◇ **lersaeezvenañ** Gouvenañ ul lodenn eus al lersae.

sclérème ◇ **sclerema** ◇ **sklerem** g. Argaledad ur gwiad, ar c'hroc'hen ent dibarek.

▷ **sklerem an oadourion** Gl. **sclérème des adultes** Sz. **scleredema** : argaledad strewek ar c'hroc'hen gant koll loc'hadegezh war ar parzhioù don, o kregiñ gant an dremm hag o c'hounit tamm ha tamm ar gouzoug hag ar bruski, en ervez da zedreñ war-du ar pare pe war-du ur skleroz isteñvus hollekaet.

▷ **sklerem an nevezc'hanidi** Gl. **sclérème des nouveau-nés** Sz. **scleredema neonatorum** : sklerem o teraouiñ boas etre 2 ha 10 devezh goude ar c'hanedigezh, kevredet gant anadennoù atrepsiezh hag oc'h echuiñ alies gant ar marv en un nebeut devezhioù.

scléieux ◇ **sclerotic**, **sclerous** ◇ **1 sklerozek** aa. **2 sklerozel** aa. 1 A zo stirek, tevaet hag argaledet, tizhet gant ar skleroz, ent dibarek a-zivout ur gwiad. 2 A-zivout ar skleroz.

sclérite ◇ **scleritis** ◇ **lersaefo** g. Tanijenn al lersae sezet ordinal er gwiad kellaouek en dro d'al lersae.

sclérochoroïdite ◇ **sclerochoroiditis** ◇ **lertolgensaefo** g. Tanijenn al lersae hag an tolgennsae.

— Bez' e c'hell bezañ *araok*, pa vez tanijennet parzh araok al lersae hag an tolgennsae, en ervez da zedreñ etrezek an dallentez. Dibaot eo an anaez-se, en ervez da zevoudañ ur stafilom araok.

— Bez' e c'hell bezañ ivez *adreñv*, arsellet en isttiwel argreskus, gant digresk al lemmed weled, ar stafilom adreñv o vezañ bezant atav.

scléroconjunctivite ◇ **scleroconjunctivitis** ◇ **lerkevresaefo** g. Tanijenn al lersae hag ar gevresae.

sclérodactylie ◇ **sclerodactyly** ◇ **bizskleroderma** g. Skleroderma sezet er bizied daouarn ha treid. Emañ en ervez da gevredañ gant kleñved Raynaud.

sclérodermatomyosite ◇ **scleroderma with dermatomyositis** ◇ **sklerodermatomiozit** g. Furm dermatomiozit kevredet gant skleroderma.

sclérodermie ◇ **scleroderma** ◇ **skleroderma** g. Kleñved kroc'hen naous dre argaledadur ha tevadur gwiskadoù don ar c'hroc'hen, kevredet alies gant daralladoù heñvel gwiad kenglenel flugezennoù diseurt (skleroderma hollekaet). Disoc'h a ra ar peurliesañ gant un isteñv kroc'hen (sl. *morphée, sclérodermie en plaques*).

sclérødème ◇ **scleredema** ◇ **skleredem** g. Gouliñv ar c'hroc'hen, koadesk ar c'hantalc'h anezhañ. Erzerc'had ur skleroderma o teraouiñ eo.

scléro-iridectomie ◇ **scleroiridectomy** ◇ **lerenvezzenañ** Dazbidañ darnel al lersae hag ar ganevedenn, en amkan da barraat ouzh ar glaokom.

sclérolipomatose ◇ **sclerolipomatosis** ◇ **sklerolipomatoz** g. Uswe gwiad kenglenel entremezel un organ gant hogennadur druzkelligoù hag isteñv elfennoù hael an organ.

sclérololyse ◇ **stirloezañ** Loezañ ar gwiad stirek.

scléromalacie ◇ **scleromalacia** ◇ **lersaevlodad** g. Boukadur al lersae. — Al *I. treloezus* Gl. *s. perforante* Sz. *s. perforans*, anaez lagad dibaot, anezhañ tachadoù isteñv, ha koll danvez daoudu zoken, sezet e lodenn araok al lersae, en ervez da vont betek an treloezad.

scléromyosite ◇ **scleromyositis** ◇ **skleromiozit** g. Astenn ar skleroz d'ar c'higennoù danlec'hiet d'ar rannbarzhioù tizhet gant ar skleroderma.

scléronychie ◇ **scleronychia** ◇ **ivinskleroz** g. Argaledad an ivinnoù.

scléropoikilodermie ◇ **skleropoikiloderma** g. Skleroderma argammedek kevredet gant ul livegad ha korrwazhiedusvolloù ar c'hroc'hen.

scléroprotéine ◇ **scleroprotein** ◇ **skleroprotein** g. Anvad hollad ar protein stirek, andileizh en dour, evel ar c'hollagen hag ar c'heratin.

sclérose ◇ **sclerosis** ◇ **skleroz** g. Argaledad kleñvedel un organ diwar struzhañ e viad kenglenel, a-ser gant ur baoted kleñvedel a 'r c'hollagen hag un dibaoted argammedek a 'r c'helligoù. Ar skleroz a vez alies pazenn dibenn un anaf foel.

sclérose cérébrale centrolobaire ◇ **skleroz empennel kreiztolbezennel** Anaez eus stroll ar sklerozioù empenn strewek o teraouiñ er vabaniezh, naous, *ent neuziadurel*, dre blakadoù sklerozek kurzhidik lec'hiet e steuñvenn wenn an div hanterenn empenn, dindan ar bluskenn ha gant un erwezh gliel, dibaot ar c'helligoù ennañ, hep roud a danijenn pe a zreistkarg kennevidel; *ent klinikel*, dre un dedro herrek en deroù, ma tarvez dreist holl andagoù, dargrezadoù, ha goude seizioù gant strafuilhoù skiantennel (dallder, h.a.), gorrekoc'h e-doug an argizad; an kez argizad ned eo morse klok, o lezel war e lerc'h treuzseizioù dasstrizhek hag ur

stad a zic'hwitadur kefredel. Tud 'zo a sell ouzh ar c'hleñved-se evel ur stad kleizennel eus skleroz empennel Schilder (empennfo amahel strewek); tud all a zisparti an daou anaez o lakaat ar *s. e. k.* e stern an empennfoioù mabanel a orin gwazhiedel pe bistriel.

scélrose cérébrale diffuse ◇ **diffuse cerebral sclerosis** ◇ **skleroz empennel strewek** Termen o teanviñ ur stroll anaezioù bodet e stern ar gwennempennfoioù. Bez' ez eus naousterioù *neuziadurel* boutin etrezo (divielinaat kentael ha skleroz steuñvenn wenn an empenn, kemparzhek ha strewek) ha *klinikel* (tuzumadur bredel, strafuilhoù pikernennek ha lagadel). Tizhet e vez ar c'houziaded yaouank, anaezioù 'zo o vezañ a natur dic'henezhadel, an eil re a orin foel. Kemm a vez lakaet etre gwennempennfo sklerozus goulemm Van Bogaert hag ar sklerozioù foel ha strewek all, ar gliomatozioù strewek (neridigezh kelligoù astrokritel hanweek o tistrujañ ar mielin), ar gwennvideñvoù argammedek, skleroz empennel Schilder gant ar skleroz empennel kreiztolbezennel, empennfo kengreizek Baló.

scélrose cérébrale de Schilder ◇ **Schilder's disease** ◇ **skleroz empennel Schilder** Seurtad skleroz empennel strewek an oadour yaouank. Naouus eo *ent neuziadurel* dre un divielinaat daoudu kemparzhek eus ar poull vigelc'hiek, o toujañ ar gwiennou gwar hag ar bluskenn. *Ent klinikel*, argammedek eo an deroù (klopennadoù, trolernoù, ankewant ha dreist holl leiadur ar gweled); goude e c'hoarvez ar strafuilhoù loc'hadel: ledseizi, daouseizi, treuzeizi dasstrizhek gant barradoù glizi. Dedreñ a ra ar c'hleñved dre resmiadoù, o tisoc'h gant an envedi, gant ar beurzallentez, ha kas a ra d'ar marv en ur stad a andalc'hiadezh gant ustant, a-benn ur bloavezh pe 18 mizvezh. Kevarguzet eo bet keñverioù *s. e. S.* gant ar skleroz empennel kreiztolbezennel ha gant ar skleroz strewek. Dianav e chom an arbennoù anezhañ.

scélrose en plaques ◇ **multiple sclerosis** ◇ **skleroz strewek** Anaez an nerved kreiz, dianav e arbenn, naouus dre furmadur plakennoù divielinaat heuliet gant skleroz, lec'hiet e steuñvenn wenn an empenn hag ar mel a-livenn. Ar skeudennerezh dre zasson gwarell derc'hanel zo ret evit an deznaou, oc'h adkavout annonioù strewek danbluskennel. Kleñved dibare ha henek, o tedreñ a-frapadoù, gant didorrvezhioù, hirbad a-wechoù. An azonoù a vez kavet ar muiañ zo: ur c'hren diarvennel, un nistagmuz, un ankedre, ur migevaot, trolernoù, un dauweled, un nervennfo gweledel drek-boull, strafuilhoù bredel. Ardardh an anaez-se a chom amsklaer evit un darn. Anadennoù unanhangaeañ, a orin hilel marteze, a vez meneget, a-se ar prederiadur dre interferon ha hangaeastalerioù.

scélrose latérale amyotrophique ◇ **amyotrophic lateral sclerosis** ◇ **skleroz kostezel kaheristeñvus** Anaez dic'henezhadel, dianav an arbenn anezhañ, eus kelligoù loc'hañ kerniel ar aok ar mel a-livenn, gant isteñv ha duilhennegrehad kigennoù an izili krec'h, gouzeizi an izili traoñ, reñveregezh an damougoù a-stirenn hag erziwezh ur seizi hirvelel, o tedreñ herrek etrezek ar marv.

scélrose latérale primitive ◇ **primary lateral sclerosis** ◇ **skleroz kostezel kentael** Anaez o naouiñ *ent klinikel* dre un divigad loc'hadel pikernennek o tarvezout goude 50 vloaz, o teraouiñ en izili traoñ, o tedreñ ent argammedek hag *ent neuziadurel* dre un tizhad digen eus an neuron loc'hañ kreiz. Tud 'zo a sell outañ evel ur seurtad skleroz kostezel kaheristeñvus.

scélrose tubéreuse du cerveau ◇ **tuberous sclerosis** ◇ **skleroz torosennek an empenn** Kleñved hêrezhel treuzkaset hervez ar mod aotozomek trec'hek, naouus *ent neuziadurel* dre vezañs, er gwiskadoù gorre an empenn, eus ozvennoù niverus a vent gant kerez pe kelvez. An kez ozvennoù zo amparet gant ur gwiad gwiennel ennañ kelligoù dezho ur protoplasm unvan ouzh o nesaat d'ar gliomou nervfurmadel. Erzerc'hañ a ra *ent klinikel* dre un diodezh, barradoù droukfell, strafuilhoù ilpennel ha seizioù; alies kenan, dre zaralladoù kroc'hen: adenomou blevsoavel kemparzhek an dremm, yoc'hennoù tro-ivin Kœnen, plakennoù galfrezet (pannoù kroc'hen rinkin); a-wechoù ez eus kevret fakomatozioù al luc'hsae ha kammneuziadoù flugezel all (ar galon: rabdomiom) pe askomel. Ur furm a fakomatoz eo.

scélroses combinées ◇ **combined sclerosis** ◇ **sklerozioù strollet** Teskad azoniadoù o naouiñ *ent neuziadurel* dre ur skleroz (pe un dic'henezhadur) diaser eus lies stirad a 'r mel a-livenn. Ar furm baotañ a gevred anafou er forzh pikernennek hag er pañsoù adreñ, an tizhad kevreet anezho o tevoudañ un treuzeizi gant strafuilhoù an eraeziñ endonel. Liesarbenn eo ar *s. s.*: sifiliz, skleroz strewek, arterioskleroz, piatriadoù pe boreadoù, amwad Biermer pergen, oc'h amparañ evel-se unan eus furmoù an azoniad nervamwadel. Ar seurtadoù kevarall a zic'henezhadurioù hêrezhel livennilpennel zo da vezañ renket er stern-se ivez.

scélrostéose ◇ **sclerosteosis** ◇ **sklerosteoz g.** Seurtad askommigomvive treuzkaset hervez ar mod aotozomek enkilek, dezhañ un tevadur reoliek eus kaenenn an eskern hir. Bras eo ar vent, gant mineuz ha seizi dremmel, gaved tuzum, bouzarded, uswask enkloppennel, bizanskar an eil hag an trede biz.

scélrotendinite ◇ **sclerotendinitis** ◇ **sklerostirennfo g.** Astenn ar skleroz d'ar stirennoù danlec'hiet d'ar rannbarzhioù tizhet gant ar skleroderma.

scélrothérapie ◇ **sclerotherapy** ◇ **sklerogurañ** Prederiadur an teuc'helloù hag ar gwazrudez dre ensinklañ aozadoù sklerozus.

scélroticotomie ou **sclérotomie** ◇ **scleroticotomy** ◇ **lersaenbenañ** Skejañ al lersae.

scolex ◇ **scolex** ◇ **skoleks g.** Penn ar aok gant organoù spegañ, mandozioù pe greier, ar preñved kestod (penn tenia).

scoliose ◇ **scoliosis** ◇ **treuzwar g.** Gwar kostezel al livenn gein, dezhañ ur c'hrommadur war-dreuz eus ar c'horfoù mellenn hag ur c'hweladur.

Scombridés ◇ **Scombroidea** ◇ **Skombridgeg l. (g.)** Kerentiad pesked mor, ennañ peurgetket an touned, ar boniked hag ar brezhili.

scombroïdose ◇ **scombroïd poisoning** ◇ **skombroidoz g.** Piatriadur gant kig *Skombridgeg* 'zo, en ervez da enderc'hel un danvezenn leteñvel ouzh an histamin.

scopolamine ◇ **scopolamine** ◇ **skopolamin** g. Alkaloid douhennet eus solaneged diseurt, dezhañ perzhioù tolc'her parasimpatek hag enepteadell.

scorbut ◇ **scurvy** ◇ **skorbut** g. Kleñved dec'hanet diwar un negez vitamin C a orin bouedel (hanren hep frouezh na legumaj fresk) er bevedeg. Naouus eo dre ul livezh arvelen a 'r c'hroc'hen, ur c'hoefvadur eus ar munsunoù en ervez da zisoc'h gant koll an dent, fennigoù ha bronduennoù dindan an ezkroc'hen, en ervez da c'houlieziañ, laur en arzoù, gwadliñvoù liesel, hag un amwad.

scorbutique ◇ **scorbucic** ◇ **skorbutek** aa., ~ar **skorbut** A-zave d'ar skorbut.

scotome ◇ **scotoma** ◇ **skotom** g. Loezenn difiñv er gwelvaez, lec'hiet gwech er c'hreiz, gwech en trobarzh, ledan pe ledanoc'h, devoudet gant bezañ poentoù digizidik war al luc'hsae. Ar s. *nac'hek* a glot gant un tachad luc'hsae ma 'z eo steuziet ar gweled, hep bezañ merzhet gant ar c'hlañvour, hogen dinoet diwar-bouez imboure'h ar gwelvaez. Ar s. *yaek*, pe *dangorek* (Axenfeld) zo "gwelet" gant ar gouzrec'h evel un tachad dispis pe evel ur vrizhenn du pe livek, resis an trolinnoù anezhi ar peurliesañ, o c'henniñ un darn eus ar gwelvaez.

scotome scintillant ◇ **scintillating scotoma** ◇ **skotom fulennek** Er c'hernad gweleled, merzhout pikoù, brizhennoù, linnoù kammregennek, skedus pe skedusoc'h.

scotométrie ◇ **scotometry** ◇ **skotometriezh** b. Delec'hiañ ha muzuliañ ar skotomoù dre welvaeziañ.

scotomisation ◇ **scotomization** ◇ **skotomiñ** Dre leterc'had ez anver s. — pe glaseloc'h Br. *ankoun hanbarus* (Gl. *amnésie élective*) — ar c'holl eus eñvor un darvoud, ur prantad buhez poanius, dre berzh ur wikefre diemouez a natur gant an arvoustrañ. Abao pell e reomp ivez gant Br. *ezkounañ* er ster-se. Etre *ezkounañ* hag *ankoun hanbarus* emañ an hevelep kevatalded hag etre Gl. *scotomiser* hag *amnésie élective*. En hevelep sterva emañ ivez *hepkounaat*, nad eo ket "ankouaat", met "kounaat en ur skarat kounaennoù 'zo", disheñvel diouzh *ezkounañ* a zo un ankouaat evitañ da vezañ hanbarek.

scotopique ◇ **scotopic** ◇ **skotopek** aa. A-zivout kizidigezh al luc'hsae ouzh skedoù izel (dindan 10^{-3} nit) — *gweled skotopek* pe *gweled nozel* (sl. *photopique et mésopique*).

Scott : syndrome de ~ ◇ **Scott's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Scott** Azoniad kammneuziad el dibaot kenan treuzkaset hervez ar mod aotozomek enkilek reveret, o kevredañ un dilerc'h bred ha kreskiñ, bizanskaroù, hag ivez ezreolderioù eus an dremm hag ar gouzoug.

scrapie ◇ **scrapie** ◇ **krenion** b. **an deñved** Seurtad empennaoued spouevanek gant an deñved hag ar givri.

scrofula ◇ **scrofula** ◇ **sl. mal du roi, écrouelles, scrofules**.

scrofuloderme ◇ scrofuloderma ◇ skrofuloderma g. Gom torzhellek, ent dibarek eus torzhellegezh gwerblennoù ar gouzoug (sl. *mal du roi, écrouelles, scrofules*).

scrotum ◇ **scrotum** ◇ **gousac'h** g. Goloenn groc'hen an divgell, ennañ ur gigenn levn, an dartoz.

scu-PA ◇ **single chain urokinase plasminogen activator** ◇ **blivaer** g. -ioù ar plasminogen a 'r rizh urokinaz unarrevell Anvet ivez pro-urokinaz, danvezenn fibrinloezus, diaraoger an urokinaz.

scybales ◇ **scyba** ◇ **monc'hro** s. Hogennadoù mon arront, kalet ha sec'h yoc'het er vouzellenn vras da heul ur goustivadur penvers.

Seabright-Bantam : syndrome de ~ ◇ **Seabright-Bantam syndrome** ◇ **azoniad** g. **Seabright-Bantam** Nep azoniad enborc'hadel dec'hanet dre an ezvezañs a erwezhañ a-berzh an organoù hag ar gwiadoù buzer, ha n'eo ket dre un isvroc'h hormon.

sébacé ◇ **sebaceous** ◇ **soav, soavel** aa. A-zave d'ar soav.

Sébileau : signe de ~ ◇ **arouez** b. **Sébileau** Azonioù o kevaraezañ resizañ natur ur yoc'henn er gousac'h : ned eo gallus piñsañ ar c'housinsae, war c'horre ar yoc'henn, ken nemet e degouezh kankr ar glidenn ; ned eo ket e degouezh ar wadvozhell.

séborrhée ◇ **seborrhea** ◇ **soavred** g. Usvorc'h gwagrennoù ar soav.

séborrhéide ◇ **seborrheid** ◇ **seboréid** g. Ekzema a zo ar soavred an arbenn pennañ anezhañ. Heñvelster : *ekzema soavred* (sl. *eczématide, dermite séborrhéique*).

sébum ◇ **sebum** ◇ **soav** g. Borc'had ar gwagrennoù soav, amparet gant ur meskad druzennoù ha danvezennoù proteek diwar zrailhennoù ar c'helligoù borc'her.

sec : syndrome ~ ◇ **sicca syndrome** ◇ **azoniad** g. **sec'h** Heskaat an daeroù hag an halv, liaien alies, gougevanet a du 'rall ouzh *azoniad Gougerot-Houwer-Sjögren*.

secondaire ◇ **secondary** ◇ **1 eilvedel (da) 2 e dianlen 3 eil-, az-, ad-, a eil renk 4 a eil lank(ad)** 1 A-zivout un anaez, heuliad da unan all — a lavarer *kentael, hennadek* —, pe o tarvezout en un eil lankad e dedro ur c'hleñved. 2 A-zivout un anaez devoudet gant unan all, pe gant un arbenn all. 3 A-zivout un devoud o tont da eil, pe ouzhpenn, a-wechoù gant nebeutoc'h a bouez. 4 O tont da heul.

second-

- *congénital ou secondaire* ganediged pe eilvedel
- *syndrome primitif (ou primaire) ou secondaire* azoniad kentael pe eilvedel
- *acnée secondaire à l'exposition à des composés chlorés* akne eilvedel da ardizhad an aozadoù klorek
- *primaire ou secondaire aux cancers du cholédoque ou de l'estomac* kentael pe eilvedel da gankroù ar san vestl pe ar c'hreuz
- *chorée aiguë, secondaire à une infection* korea lemm e dianlen ur pore
- *secondaire à une affection cardiaque* e dianlen un anaez kalon
- *cataracte secondaire*

azferennlug, ferennlug eilvedel • *caractères sexuels primaires et secondaires* kentrouezioù hag eilarouezioù revel • *dont les éléments arrivent secondairement au contact les uns des autres* a zeu an elfennoù anezhañ da gejañ kenetrezo a eil lank • *secondairement infiltrés de lipides* ensilet a eil lankad gant lipid.

secondipare ◇ **secundiparous** ◇ **eilganerez** b. -ed Maouez o wilioudiñ evit an eil gwech.

secret médical ◇ **medical secret, medical confidentiality** ◇ **rin g. mezegel** Endalc'h o c'hourlakaat d'ar mezeg da devel war gement devoud gouezet gantañ en embreg e vicher a-zivout e c'houziviaded, lakaet er-maez an degouezhioù erverket gant al lezenn.

secreta ◇ **secreta** ◇ **borc'hadurezh** b. Hollad ar vorc'hadoù eus ar bevedeg.

sécrétagogue ◇ **secretagogue** ◇ **1 borc'heiat** aa. **2 borc'heiat** g. -où 1 A-zivout un danvezenn o telankañ pe o kreskiñ borc'hadur ur wagrenn. 2 Danvezenn vorc'heiat.

Secrétan : syndrome de ~ ◇ **Secrétan's syndrome** ◇ **azoniad g. Secrétan** Gouliñv kalet kein an dorn diwar un daraez dister a-wechoù hag o tevoudañ un dic'houested arc'hwelel hirbad (sl. *main figée*).

sécréteur ◇ **secretor** ◇ **borc'her** aa. O tadoaliñ ur borc'had. Sk. : *kellig borc'her*.

sécrétine ◇ **secretin** ◇ **sekretin** g. Hormon borc'het gant glaourgenn an daouzegenn o fraouaat borc'herezh an ilgreiz.

sécrétion ◇ **secretion** ◇ **borc'hañ** Arc'hwel bonan ur gellig, ur gwiad pe un organ, anezhañ danzen un danvezenn, degorzhet er-maez pe dinaouet er gwad. An kez danvezenn a vez graet *borc'had* anezhi, hag arveret e vez an deveradoù boas e brezhoneg — *borc'hadenn, borc'hadur, borc'hadurezh, borc'herezh, borc'hidigezh* hag ivez *anvorc'h, hevorc'h, envorc'h, ezvorc'h, isvorc'h, usvorc'h*, h.a. —, hervez a venner eztaoliñ. — An *ezvorc'hañ* (Gl. *sécrétion externe*, Sz. *external secretion*) zo ur mod borc'hañ ma 'z eo ar borc'had dinaouet war-eeun er-maez eus ar c'horf pe en ur gavenn gehent gant an diavaez, da skouer borc'hañ *ar vromn, ar gwagrennoù c'hwezparañ, ar gwagrennoù halviñ*. — An *enborc'hañ* (Gl. *sécrétion interne*, Sz. *internal secretion*) zo ur mod borc'hañ ma 'z eo ar borc'had dinaouet er gwad pe el limf, da skouer borc'hañ *ar gwagrennoù us-lounezh, ar c'hougorfenn*.

sectoriectomie ◇ **gennadezvenañ** Dazbidañ ur parzh organ (gennad) o furniñ un tiriad hiniennaet mat ent gwazhiedel hag ent arc'hwelel; an kez parzh a c'hell bezañ amparet gant lies hanrann. Da skouer : lemel ur gennad porzh eus an avu (sl. *segmentectomie*).

sectorisation psychiatrique ◇ **psychiatric sectorisation** ◇ **gennadiñ bredvezekniezhel** Rannañ un tiriad e gennadoù dindan pep a stroll bredvezekniezh, a c'hell emellout ivez e stern ar *vredvezekniezh keneren*.

sécurité sanitaire ◇ **health security** ◇ **diogelezh g. yec'hedel** Aozadur dezhañ ar gefridi eveshaat stad yec'hed ar boblañs, dreist holl evit a sell ar riskloù bouedel, trevvael ha liael.

Sécurité sociale ◇ **Social Security** ◇ **Kedskor** g. Aozadur diazezet e 1945 e Frañs, oc'h arc'hwelañ dindan reolerezh ar Stad, dezhañ da gefridi kretaat al labourerion enep ar riskloù en ervez da leiaat o barr gounit ha d'o skoazellañ da c'holeiñ o c'hargoù familh.

sédatif ◇ **sedative** ◇ **1 hezus** aa. **2 hezer** g. -ioù 1 A-zivout nep danvezenn en araez da sioulaat al laur, da leiaat an tennder nerverl pe gwerederezh reñverek un organ. 2 Gwezher hezus.

sédation ◇ **sedation** ◇ **hezañ** Sioulaat, distav diwar-bouez hezerioù.

sédimentation ◇ **sedimentation** ◇ **gouzediñ, gouelediñ** Furmadur koc'hion o ouelezenniñ diwar dierc'hadur rannigoù en arlug pe war zileizh en ul liñvenn. Graet e vo gant an deveradoù boas diwar ar pennanorioù : gouzed, gouzedad, gouzedadur; gouledad, gouledadur; goulezenn, goulezennad. — *gouzediñ an hemati, gouelediñ an hemati, gouzediñ ruzkelligel* (Gl. *s. des hématies, s. globulaire ou sanguine*, Sz. *erythrocyte sedimentation*) : gouzedadur ar c'helligoù ruz e-barzh ar plasma, pa vez lezet ar gwad digoaouledusaet er paouez en ur gorzenn. An tizh gouzediñ ruzkelligel (TGR, Gl. *VSG, vitesse de sédimentation globulaire*) a argemm en amveziadoù bonan ha kleñvedel diseurt ha savelet e vez diwar-bouez meur a hentenn (Cutler, Westergren, Wintrobe, h.a.).

Seemann : syndrome de ~ ◇ **azoniad g. Seemann** Strafuilh diorreadur an ilpenn gant ankedre, strafuילוù rakkambrel ha dinodadur ar c'homz dilerc'het.

segment ◇ **segment** ◇ **1 hanrann** b. **2 hoskad** g. 1 Parzh ul luniad korfadurel hiniennaet hervez dezverkoù 'zo. Graet e vez ivez gant an termennoù *parzh, rann, lodenn, tammad*, pa na vez amjstregezh ebet, ar rakger *han-* o verkañ an hiniennaet, en ur yezh resisoc'h. Da skouer : *parzh kromozom* ha *hanrann gromozom, rann ezel* ha *hanrann ezel, ur rann eus ar vouzellenn voan* ha *un hanrann eus ar vouzellenn voan*. 2 Parzh un organ gavalet etre daou glom pe div strishaenn, lies hini lerc'h-ouzh-lerc'h. Da skouer : *hoskad krenn kavenn ar c'harloc'henn*, pe c'hoazh *hoskad Ranvier*, parzh eus an nervwienn mielinek gavalet etre div strishaenn Ranvier.

segmentation ◇ **segmentation, cleavage** ◇ **1 hanrannañ, hanrannadur** g. ; **darnaouadur** g. **2 hoskiñ, hoskegezh** b. 1 Rannadur e parzhioù heñvel pe heñveloc'h, da skouer *hanrannadur korf ar rizhell*, pe *ar vi war hanrannañ*. 2 Furmadur parzhioù — kenheuilh alies — en un organ, ur graoñell ent dibarek. E-se : *derez hoskegezh*, pe c'hoazh *mielokit a zo krog o c'hraoñell da hoskiñ*.

segmentaire ◇ ◇ **hanrannel** aa., **rannel** A-zivout ur rann, un hanrann.

segment-massage ou **segment-thérapie** ◇ **segment-massage** or **segment-therapy** ◇ **hanrannleuñviñ** pe **hanrann-gurañ** Kalvezder leuñviñ, diwar-bouez ar biz kreiz, ur gwiad kenglenel, oc'h embreger ul linkañ spesadel. Arveret e vez ivez ar

c'halvezder-se evit an amaskornenn, kevaraezus da gresk an askorn. An hanrann angorzhet zo ar rannbarzh nervaouet gant an un nervenn a-livenn, o c'hoarvezout eus kroc'hen, kigenadur, nervennoù, gwazhied, eskern hag organoù.

segmenté ◇ ◇ **1 hanrannek aa., rannek 2 hoskek aa.** 1 A c'hoarvez eus hanrannoù, rannoù. 2 A c'hoarvez eus hoskadoù. Anv zo eus *furmou nemeurhoskek*, hag ivez eus *furmou lieshoskek*, eus *ur graoñell daou-pe drihoskek*. An ezvezañs a hoskadoù a vez doareet gant an adanv *anhoskek*, da skouer *leukokit anhoskek*.

segmentectomie ◇ **segmentectomy** ◇ **hanrannezevenañ** Dilemm surjanel un hanrann organ oc'h amparañ un tiriad hinienn-aet mat, ent gwazhiedel hag ent arc'hwelel (avu, skevent, h.a.) (sl. *sectoriectomie*).

Segond : fracture de ~ ◇ **Segond's fracture** ◇ **torr g. Segond** Digrañ ur skantennig araok-diavaez eus penn uhelañ ar skin, e dianfen freg stagell e kroaz araok-diavaez ar glin.

ségrégation ◇ **segregation** ◇ **hanbarzhañ** 1 En hiloniezh, disrannadur an allelennoù e-kerz ar meioz. 2 En darwinouriezh, argerzh arbennik a zaskenadur eus ar spesadoù : en ur spesad roet, an hiniennoù gwanañ, e-lec'h mont da get, a c'hell emzirsannañ diouzh ar re a zo azasaet gwelloc'h. Treuztiriañ a reont hag emziorren en ur metoù all, ma tec'hanont ur spesad nevez.

Seidel : épreuve de ~ ◇ **Seidel's test** ◇ **prouad g. Seidel** Arglask ur gouli er gornsaes dre enberañ ur c'hollir dre fluoreskein.

Seidel : scotome de ~ ◇ **Seidel's scotoma** ◇ **skotom g. Seidel** Skotom gwarennec o hiraat ar vrzhenn dall, arsellet er glaokom henek.

Seitelberger : maladies de ~ ◇ **Seitelberger's disease** ◇ **kleñvedoù Seitelberger** 1 Seurtad dibaot a sfingolipidoz familhel treuzkaset moarvat hervez ar mod aotozomek enkilek, naouus ent neuziadurel dre un usvec'h lipo-glikoproteek kemplezh, muiek war aksonoù an nergelligoù. Deraouiñ a ra, en daou vloavezh kentañ eus an hoali, dre un istant kahelel hag un astad eus an diorren savder-pouez. Ha goude e tinod un dargrezañ en izili traoñ, kahegridoù, droukfell, arouezioù hirvelel, un nistagmuz, un displebadur bred muiek hag un dallentez. Echuiñ a ra gant ar marv kent an oad a 10 vloaz. Bez' ez eo ul lipoidoz eus an nergveg kreiz. 2 Seurtad dibaot a wennvideñv soudanlen, ma 'z eo an ezvezañs a vielin, hollel, lec'hiet strizh en nergveg kreiz. Hañvalout a ra bezañ nes da gleñved Pelizaeus-Merzbacher.

sel ◇ **salt** ◇ **1 hal g. -ioù 2 holen g.** 1 Nep kediad kimiek o tisoc'h eus dazgwered un drenkenn war ur vazenn. 2 Er yezh voutin, kloridenn natriom. Ur reol voued hep holen, un hanren hep holen, pe ur reol voued diholen.

sels biliaires ◇ **bile salt** ◇ **halioù bestl, halioù bestlel, bestlhalioù** Haliou natriom ha kaliom an trenkennoù bestlel gant div amindrenkenn, ar glin hag an taorin.

Seldinger : méthode de ~ ◇ **Seldinger's technique** ◇ **hentenn b. Seldinger** Kalvezder kateteriñ ar galon a-gleiz dre hent talmerel, a-vorzhed ar peurliesañ.

sélectine ◇ **selectin** ◇ **selektin g.** Glikoprotein o tasperzhiañ e glenadur al leukokit hag ar pladanoù ouzh endotelienn ar gwazhied.

sélection ◇ **selection** ◇ **1 diuzañ; diuz g., diuzad g. 2 diuzouennañ** 1 Dibarzh, dibab. 2 A-zivout loened, plant, dibabet ha gwellaet ar ouenn anezho. — En *diuzouennañ naturel* (Gl. *sélection naturelle*), e vez an dibarzh e dalc'h ar c'heñver etre doareennoù 'zo gant ar gouennerion hag ar metoù ma vevont, o reiñ lañs da rummadoù 'zo diwar-goust re all. — En *diuzouennañ kalvezadel* (Gl. *sélection artificielle*), e vez renet an dibarzh gant ar mager war-benn keneliañ an hiniennoù e piaou d'ur genotip divizet.

sélénium ◇ **selenium** ◇ **seleniom g.** Elfenn gimiek a niverenn atom 34, a dolz atom 78,96 ha *Se* he arouez. Un divetal eo, dezhañ perzhioù nes da re ar sulfur. Un dasperzhiadur pouezus zo d'ar seleniom e gwerederezhioù enzimatek 'zo. Pistrius eo a zoenadoù bras : kahernaoued kalon Keshan ha kleñved Kashin-Beck.

séline ◇ ◇ **selin g.** Brizhennoù arwenn o tont war an ivinoù diwar un negez silikiom, moarvat.

Selivanoff ou Selivanov : réaction de ~ ◇ **Selivanoff's test** ◇ **prouad g. Selivanoff** Dazgwered kimiek naouus d'al levuloz.

sellaire ◇ **sellar** ◇ **~dibr, dibrel aa.** A-zivout an dibr turkek. Menegomp an termennoù : *nes-dibr, e-barzh-dibr pe endibrel, us-dibr, rak-dibr pe rakdibrel*.

selle turcique ◇ **sella turcica** ◇ **dibr g. turkek** Nant war dalbenn krec'h korf ar genneg, ma emañ ar c'hougorfenn.

selle turcique en ballon ou selle ballon ◇ **enlarged sella turcica** ◇ **dibr g. turkek ledanaet** Muiadur holl dreuzkizoù an dibr war ur skinlun a 'r c'hlopenn a-zalc'h gant diorreadur un adenom pe gant un dibr turkek goullo.

selle turcique vide : syndrome de la ~ ◇ **empty sella syndrome (ESS)** ◇ **azoniad g. an dibr turkek goullo** Klopennlun o tiskouez un dibr turkek ledanaet, diwar un astennadur endibrel eus ar gavenn endan-gevnodek, o tevoudañ kevredet klopennadoù ha strafuilhoù gweledel. Borc'hañ ar c'hougorfenn a c'hell bezañ reol pe leiaet.

selles ◇ **feces, stools** ◇ **mon g., kaoc'h g., oulennoù l. (b.), kac'had g. -où, kac'hadenn b. -où, egesta l.** Danvezioù distaolet ent reol gant ar ganol vezhur (sl. *excréments*).

sémaphorine ◇ **semaphorin** ◇ **semaforin g.** Protein o tasperzhiañ e bleniañ hag en adc'henezhañ an aksonoù. E kerentiad ar semaforinoù ez eus elfennoù o werediñ e meur a rezh war ar gwazhiedparañ ha dinodadur ar yoc'henoù.

semelle orthopédique ◇ **orthopedic sole** ◇ **solenn b. gorfeunadel** Amsteudell stalet er vitez dindan volz diahed an troad evit he harpañ pe evit derezhañ al lakadur anezhi.

semi-léthal ou **subléthal** : **facteur** ou **gène** ~ ◇ ◇ **parenn** pe **genenn** b. **c'houdrankus** Genenn pe stroll gen bezant gant ar gerent hag o tevoudañ marv ar bugel kent e gaezhouregezh.

séminal ◇ **seminal** ◇ **˜sper, sperel** aa. A-zivout ar sper.

séminome ◇ **seminoma** ◇ **seminom** g. Yoc'henn yud evodet diouzh bongelligoù revel ar gwagrennoù ganadel (klidenn pe vierez). Kemm a lakaer etre ar *s. spermatogonek* — seminom klasel Chevassu, goniom, disgerminom, dec'honet gant neridigezh bongelligoù revel yaouank kenan — hag ar *s. spermatokitek (spermatokitom)* dibaot kaer, a denn ar c'helligoù anezhañ d'ar spermatokit (sl. *spermatogènèse*).

sémiologie ou **séméiologie** ◇ **semeiology** ◇ **arouezoniezh** b. Rann ar vezekniezh amkanet da studiañ an azonoù hag an arouezioù oc'h erzerc'haat anaf un organ pe strafuill un arc'hwel.

sémiologique ◇ **semeiotic** ◇ **arouezoniel** aa. A-zave d'an arouezoniezh.

sénescence ◇ **senescence** ◇ **argozhañ** Mont war an oad, koshaat, o tevoudañ fillidigezh alies.

Senhouse-Kirkes : **maladie de** ~ ◇ **primitive acute infectious endocarditis** ◇ **kleñved** g. **Senhouse-Kirkes** Enkalonnennfo kentael lemm yud gant anafoù angreizhek ha struzhennek o tarvezout war ur galon vonan.

sénile ◇ **senile** ◇ **kozhiadel** aa., **˜ar gozhiadel** A-zave d'ar gozhni, pe devoudet ganti.

sénilisme ◇ **senilism** ◇ **kozhiadegezh** b. **kenrat** Stad ur bugel pe un oadour dezhañ neuz un henad : kroc'hen sec'h ha roufennek, kouezh ar blev, skleroz talmerel, h.a. (sl. *progérie, gérodermie génito-dystrophique*).

sénilité ◇ **senility** ◇ **kozhiadegezh** b., **toc'hended** b. Leiadur argammedek ar galloudezhioù korfel ha kefredel gant an henad.

Senior-Loken : **syndrome de** ~ ◇ **Senior-Loken syndrome** ◇ **azoniad** g. **Senior-Loken** Kevreted daou gleñved hêrezhel, un nefronofuz hag un diec'henezhadur tabezennluc'hsael. An eil a zevoud ur c'holl kenrat hag argammedek eus ar gweled, a-wechoù gant ul luc'hsaead livgennek ha distresad ar gwelvaez.

Senning : **opération de** ~ ◇ **Senning's operation** ◇ **oberatadenn** b. **Senning** Gwezhiadenn surjaniel amkanet da beurzezeizhañ kammloadur klok ar gwazhied bras. Dre araez un amredad ezkorfel ez azneuzier an dilhenn etre-kentezoù ha speuriou ar c'hentezoù, e doare da ren ar gwad o tont eus gwazhiennoù ar skevent war-du ar c'hentez dehou, ma tizho an aortenn dre ar c'hofig dehou ha hini ar gwazhiennoù kav etreze ar c'hentez kleiz, ma tinaou e kef ar skevent dre ar c'hofig kleiz (sl. *Mustard : opération de ~ et Blalock-Hanlon : opération de ~*).

sénologie ◇ **mastology** ◇ **bronnouriezh** b. Studi ar vronn ken bonan, ken klañv (sl. *mastologie*).

sens ◇ **sense** ◇ **skiantenn** b. Eraezñ o kevaraezhañ merzhout anglevadoù emouez (santadoù). Ar pemp skiantenn glasel zo ar gweled, ar c'hleved, ar c'hwhesa, an tañva hag ar stekiñ.

sens musculaire ◇ **muscular sense** ◇ **eraezñ loc'hadel** ; **loc'heraezñ** Merzhout ar stlenn loc'hadel dastumet e par organoù al loc'hañ, kigennoù, stirennoù, eskern, kenvelloù.

sensibilisation ◇ **sensitization** ◇ **kizidikaat** Araezad amkanet da lakaat un organ pe ur gwiad en araez da erwezhañ en un doare dibarek (erwezh allergek) e diastok ur gwezher fizikel, kimiek pe bevel (antigen). Ar c'hizidikaat zo en orin erwezhoù angougemer hollek (bleuz, terzhienn) pe lec'hiek (linadell, ikter, purpura, h.a.). — Un anadenn hangaeel eo, ma 'z eus un dasperzhiadur bonel gant al limfokit. War c'horre reoù 'zo anezho ez eus buzerioù (immunoglobulinoù) spesadel eus antigenoù 'zo (pe eus rummoù 'zo a antigenoù). Da geñver ur c'heraez a 'n antigenoù-se, o naouaat a reont , o degerc'hañ ha neuze a emdrezfurm e kelligoù yaouank, blastek, ha goude a emrann : kizidikaet eo ar c'helligoù ganet diouzh an emrannañ-se. Ul lod a zasperzh raktal en erwezh hangaeel, ul lod all a vir ar c'hizidikadur-se evel memor ha delankañ a raint un erwezh hangaeel e degouezh ur c'heraez nevez eus an un antigen. Seurt kizidikadur eus al limfokit a c'hoarvez er gwerblennoù limf hag er felc'h (sl. *allergie, anaphylaxie*). Kemm a lakaer etre *k. unanien* Gl. *s. autogène ou endogène* — kizidikaat ur bev gant albuminoù e wiadoù dezhañ e unan — ha *k. allien* Gl. *s. hétérogène* — kizidikaat gant albuminoù ur bev all ebarzhet er bevedeg —. Mar ensinkler un antigen er bevedeg e teu ar bev da vezañ *kizidikaet* : anv zo eus *kizidikaat oberiat* (Gl. *s. active* Sz. *active* s.). Mar ensinkler er bevedeg gwadvez ur bev kizikaet — ha n'eo ket un antigen — e komzer neuze eus *kizidikaat gouzañvat* (Gl. *s. passive* Sz. *passive* s.).

sensibilisatrice ◇ **sensibilisatrice** ◇ **kizidikaer** g. **-ioù** Antikorf spesadel a len ouzh an antigen keñverek o furmiñ un hangae-gemplezh. Neuze e teu an kez antigen da vezañ kizidik ouzh gwered neptuiñ pe dispenn ar glokaenn. Bakterilazhusted, gwad-pe gelligloezusted ur gwadvez, gant an elfennoù-se ennañ, zo devoudet neuze gant kenwered div barenn, pep hini anezho o vezañ angwezhus diouti he unan : an eil zo an danvezenn-se, spesadel, o herzel ouzh ar gwrezverk a 55°C, gwezhus hepken goude lenadur ar c'hizidikaer, eleze ar glokaenn (sl. *complément, anticorps, complexe immun*).

sensibilité ◇ **sensibility, sensitivity** ◇ **1 kizidigezh** b., **frauidigezh** b. **2 santout (& santerezh** g., **santidigezh** b.), **eraezñ 3 kizidigezh, gwiridigezh** b. **4 kizidigezh, diuzusted** b. 1 Perzh ur buzer da vezañ fraouaet. 2 Perzh e piau d'an nerved da zegemer, dezrannañ, gougevaniñ ar c'hentrigennoù ha da vezañ en doare-se stlennet war an anadennoù diavaez ha diabarzh. 3 a-zivout ur gouzrec'h, perzh da santout ul laur. 4 Er stadegouriezh, andalad araezusted ur proudad da reiñ un disoc'h yaek pa vez gwiriet ur c'houlakadenn. Enebet eo ouzh ar *spesadelezh*, andalad araezusted ur proudad da reiñ un disoc'h nac'hek pa na vez ket gwiriet ar c'houlakadenn. Pouezus kenan eo an daou andalad-se er reuziadoniezh hag e dinoerezh an arhentoù, dreist holl diwarbouez ar c'hrommennoù ROC (Sz. *receiver operating characteristic*), eleze ar c'hrommennoù *kizidigezh/spesadelezh* o titouriñ naousterioù digonusted ur proudad. E mezekniezh enta, diuzusted pe kizidigezh ur proudad zo e varr dioumat an holl glañvourion

(eleze kaout an niver izekañ a c'haouac'heion), tra ma 'z eo spesadelezh an kez prouad e varr diurnat ar glañvourion nemetken (kaout an niver izekañ a c'haouyaieion).

sensibilité épicrotique ◇ **epicritic sensibility** ◇ **eraeziñ skaradel** Eraeziñ kroc'heneel (stokeraeziñ, gwrezeraeziñ), o kev-araezañ ur skarad fin en egor.

sensibilité extéroceptive ◇ **exteroceptive sensibility** ◇ **eraeziñ gorrefraouadel** Eraeziñ ur gorrefraoua, eleze laureraeziñ, gwrezeraeziñ ha yenioneraeziñ, gwaskeraeziñ, daznaout an ergennoù hag an dafaroù, h.a.

sensibilité intéroceptive ◇ **interoceptive sensibility** ◇ **eraeziñ endonfraouadel** Eraeziñ e dalc'h ar flugezfraouadoù.

sensibilité pallesthésique ◇ **pallesthetic sensibility** ◇ **froumeraeziñ** Eraeziñ a-zave d'ar santadurioù froumel.

sensibilité proprioceptive ◇ **proprioceptive sensibility** ◇ **eraeziñ anunfraouadel** Eraeziñ e dalc'h an anunfraouadoù, diwar ar broudadoù e par ar c'higennoù hag ar c'henvelloù.

sensibilité protopathique ◇ **protopathic sensibility** ◇ **eraeziñ protopatek** Eraeziñ kroc'heneel e dalc'h, da gentañ, ar c'hentrigennoù kreñv (gwrezverk ha laur pergen), hep dezrannañ fin ar gentrigenn pe al lec'hiadur anezhi, amkanet hepken da zeluskañ erwezhoù gwazeziñ a-berzh ar bevedeg.

sensibilité somesthésique ◇ **splanchnesthetic sensibility** ◇ **eraeziñ korferaezadel** Termen hollek oc'h erdalañ an doareoù merzhout kevarall eus ar c'horf (nemet ar re e dalc'h an organoù skiantennel arbennikaet : gweled, kleved, h.a.).

sensibilité suplée ◇ **eraeziñ kevelet** Eraeziñ o trebadout en un ezel pe un hanrann ezel, daoust ma 'z eo bet skejet un darn eus an nervennoù degasat.

sensibilité thermique ◇ **thermic sensibility** ◇ **gwrezeraeziñ** Eraeziñ a-zave d'an daskemmoù gwrezverk keñverel.

sensible

• *sensible aux variations de pression* kizidik ouzh an argemmoù gwask • *organe ou zone du corps sensible à certaines substances chimiques* organ pe dachad korf kizidik ouzh danvezennoù kimiek 'zo • *composant cellulaire sensible aux agents physiques* kedrann gellig kizidik ouzh gwezherioù fizikel • *sensible à l'action des radiations ionisantes* kizidik ouzh gwered ar skinadoù ionaus • *moins sensible à l'insuline* nebeutoc'h kizidik ouzh an insulin • *test plus sensible* prouad kizidikoc'h • *sensible à la lumière* luc'hfraouidik • *sensible à la noradrénaline* fraouidik ouzh an noradrenalin • *récepteur sensible à l'action de l'acétylcholine* buzer fraouidik ouzh gwered an aketilkolin • *caractérisé par un foie gros et sensible* naouus dre un avu tev ha gwiridik • *barosensible* gwaskeraezus, gwaskfraouidik • *vasosensible* gwazhiederwezhidik • *germes sensibles aux antibiotiques* hadennoù hedizh d'ar bevastaleroù • *diabète pitresso-sensible* diabet hedizh d'ar vazopresin..

sensitif ◇ **sensitive** ◇ **˘ar santout, ˘santout, santadel aa., eraezadel aa.** A-zave d'ar santadoù pe d'ar santout, d'an eraeziñ. Da skouer : *nervenn santout, nervenn santadel* Gl. *nerf sensitif* ; *direizhoù, strafuilhoù santadel* Gl. *troubles sensitifs* ; *merzhout eraezadel* Gl. *perception sensitive*.

sensoriel ◇ **sensorial** ◇ **skiantennel aa.** A-zave d'ar skiantennoù. Da skouer : *direizhoù skiantennel ha kantaazel* Gl. *troubles sensoriels et affectifs* ; *erwezh ouzh ar fraouadoù skiantennel* Gl. *réaction aux stimulations sensorielles*.

sensitivo-moteur ou **sensorimoteur** ◇ **sensitivo-motor** ou **sensorimotor** ◇ **˘santout-loc'hañ ; santadel-loc'hadel aa.** A-zave d'al loc'hañ ha d'ar santout. Da skouer : *anadennoù santadel-loc'hadel* : gwexhiadoù damougek, a-gevenep d'an anadennoù argeladel.

sepsis ◇ **sepsis** ◇ **sepsiz g.** Hanc'her erbedet abaoe 2016 e-lec'h ar Gl. *septicémie* hag ar Sz. *septicemia*, daoust ma chom heñvelster an termenou evit lod. Despizet eo ar *sepsiz* evel ur c'hleñved reizhiadel devoudet, pe gant neridigezh korrevion en amred ar gwad, pe gant an toksinoù hag an hanteradoù dilaosket en erwezh ouzh ar c'heuziad poreel. Anv zo a *sepsiz* e degouezh a AEFR *azoniad an erwezh foel reizhiadel* (Gl. *syndrome de réponse inflammatoire systémique*, SIRS) e diazalc'h gant un annon pore dervaet pe debek. Dav lakaat kemm etre *sepsiz* ha *gwadvakteriegezh*, anezhi an tremen berrbad pe bad eus bakteri en amred ar gwad, diwar un annon pore. — *s. grevus* pe *lemm* : kevredet gant an azoniad a falladur lies organ, iserfenn ar gwad pe iswask. — *bleuz lestel* : sepsiz grevus kevret gant un iswask kilvers ouzh leuniadur ar gwazhied (iswask despizet dre ur gwask talmerel sistolel izeloc'h eget 90 mmHg pe dre ul leiadur brasoc'h eget 40 mmHg eus ar werzhad voas). Ar bleuz lestel zo dedro olañ ur sepsiz anvezeget.

septal ◇ **septal** ◇ **tilhennel aa.** A-zave d'un dilhenn.

septane : **fièvre** ~ ◇ **septan fever** ◇ **terzhienn b. seizhvedek** Doare terzhienn spanaus, ar barroù o tarvezout ar seizhvet deiz o lezel etrezo un entremez pemp devezh.

Septata ◇ **Septata** ◇ **Septata** Genad mikrosporidi kiriek da arvevadegezhioù koulzataer.

septénaire ◇ **septenary** ◇ **seizhdevezhiad g.** Prantad a bad seizh devezh.

septicémie ◇ **septicemia** ◇ **gwadlestegezh b.** Stad kleñvedel diwar strewidigezh hadennoù kleñvedus o tont eus un annon pore, dre hent ar gwad. Mard eo bet erbedet dilezel an termenou gallek ha saoznek, diforc'hell e chom an hanc'her brezhonek. — *g. kelardarzh* : ne c'haller dinoñ annon pore ebet. — *g. eskorvezhel* : orin ar c'hleñved zo ur pore eus ar benvegad ganadel, ar grozh pergen, war-lerc'h ar gwilioud. — *g. wazhiennel* : g. diwar dizhadur ar reizhiad wazhiennel.

septicité ◇ **septicity** ◇ **lestegezh b.** Neuz lestel ha poreel ur c'hleñved.

septicopyohémie ◇ **septicopyaemia** ◇ **gwadlinlestegezh** b. Seurtad gwadlestegezh diwar garvevion lineiat rouestlet gant lies annon lineañ.

septidien ◇ ◇ **seiteziat** aa. A-zave d'ur pad seizh devezh. — *korvez s.* : korvez dezhi seizh devezh trovezh.

septique ◇ ◇ **1 lestek** aa. **2 lestel** aa. 1 Stad m'emañ un dafar, ur metoù, erialet gant garvevion, hadennoù. 2 A-zave d'al lest.

septite ◇ ◇ **tilhenno** g. Tanijenn un dilhenn.

septostomie ou **septectomie** ◇ **septostomy** or **septectomy** ◇ **tilhennezvenañ** Gwezhañ un igorenn en un dilhenn, evit a sell ar fri, ar galon, an amnion pergen. Da skouer : *kentezenbenañ treuztilhennel Rashkind* Gl. *auriculotomie transseptale de Rashkind*, *septostomie atriale*, anezhañ kehentaat daou gentez ar galon. Ur skouer all : *tilhennezvenañ amnionel*, anezhañ kehentaat seier amnionel daou c'hevell *in utero*. Amkan ar wezhiadenn-se zo assav ur c'hempouez gwask etre an div gavenn amnionel, dre gevaraezañ an tremen diskoilh eus ar roadour d'ar roer. Seurt hentenn zo bet dilezet gant an darn vrasañ eus ar c'hreizennoù (sl. *auriculotomie*, *Blalock-Handon : opération de ~*).

septotomie ◇ **septotomy** ◇ **tilhennenbenañ** Skejañ surjaniel un dilhenn (ar fri, ar galon).

septum ◇ **septum** ◇ **tilhenn** b. Speur, lienenn dispartiañ.

séquelle ◇ **sequela** ◇ **arlenad** g. Rouestladoù diwezhat pe zivezhatoc'h a gendalc'h hir pe hiroc'h war-lerc'h ur c'hleñved pe un daraez.

séquençage ◇ **sequencing** ◇ **dezkemalañ** 1 Er vevgimiezh : spizañ urzh a-linenn kedrannoù ur c'heurlivell (amindrenkennoù ur protein, nukleotidoù un drenkenn nukleek evel an DNA, monosakaridoù ul liessakarid, h.a.). 2 En hiloniezh : spizañ kemaladur ar gen, ar c'hromozomoù, pe ar genom klok zoken. Ent kalvezel e talvez hennadiñ an DNA oc'h amparañ an kez gen pe an kez kromozomoù.

séquence ◇ **sequence** ◇ **kemalenn** b., **kemalad** g. Lerc'hiad urzhiet.

séquestration ◇ **sequestration** ◇ **amskar** g., **amskarad** g. 1 Tamm gwiad (askorn, skevent) bac'het e-kreiz ar gwiadoù all hep darempred arc'hwelel ganto. 2 Gwad azdalc'het en un tiriad gwazhiedel outañ e unan ent arc'hwelel hag ezamredet. Pe c'hoazh, tolzennad liñvenn daskaezhet er pervez da geñver un antreizh.

séquestration pulmonaire ◇ **pulmonary sequestration** ◇ **amskarad skevent** Anvad rumm evit kammneuziadoù ar benvegad analañ, anezho an disrann eus un tamm gwiad bronkez-skevent diouzh e gevreoù reol. An tiriad, e diouer gwazhiedadur ha/pe gwentadur arc'hwelel, a vez e-se amskaret ha peurliesañ eroueriet gant un dalmerenn drogorfel gousskoef o tont eus an aortenn pe eus unan eus e barroù. Rumm e vez an amskaradoù skevent etre amskaradoù diwar nov bronkezel dreistniver hag amskaradoù hep nov bronkezel dreistniver.

séquestre ◇ **sequestrum** ◇ **amskar** g. -où Tamm askorn marvennet aet distok diouzh ar gwiad kenglenel amezek ha, dre se, na c'hell mui bezañ deloezet.

séquestrectomie ◇ **sequestrectomy** ◇ **amskarezvenañ** Dilemel dre surjianerezh un amskar diouzh un askorn bev.

séreuse ◇ **serous membrane** ◇ **lienenn** b. **levrus**, **levrgenn** g. Lienenn danav deveret diouzh ar c'helom rihellel, o c'hoarvezout eus ur vezotelienn o c'holeiñ gwiad kenglenel hag o wiskañ kavennoù kloz ar bevedeg (amgalonenn, ampelell, krezenn).

séreux ◇ **serous** ◇ **levrus** aa. 1 O toareañ al liñvenn borc'het gant al levrgennoù. 2 O toareañ al levrgennoù. Sk. *amgalonenn levrus*.

Sergent-Bernard : syndrome de ~ ◇ ◇ **azoniad** g. **Sergent-Bernard** Furm lemm ar skorted uslounezhel oc'h erweañ ur pistriadur gourlemm pe un ampelell hag o kas buan d'ar marv.

sérine ◇ **serine** ◇ **serin** g. Amindrenkenn c'hlukoseiat bevanret, outi ur soaz alkool. An deverad fosforilet diwarni zo kedrann er fosfoproteinoù. Esteraet gant an drenkenn fosfatidek, e c'han ar fosfatidilserin, anezhañ ur fosfolipidenn bouezus.

seringue ◇ **syringe** ◇ **strinkell** b. Benveg arveret da ensinklañ pe da erlemel ul liñvenn e kanolioù, kavennoù pe wiadoù ar c'horf. C'hoarvezout a ra eus ur gorzenn, ur beg ouzh ur penn anezhi, ma emañ skarvet un nadoz kleuz pe ur c'horzan. Er gorzenn e rikh ur vountell a gevaraez sunañ pe vountañ al liñvenn.

seringue : pathologie de la ~ ◇ ◇ **kleñvedoù ar strinkell** Teskad ar c'hleñvedoù diwar hadennoù kleñvedus pe arveveded enkoret dre zarvoud diwar-bouez strinkelloù pe nadozioù dishadenet fall.

sériographe ◇ **seriograph** ◇ **seriograf** g. Ardivink o kevaraezañ skinluniñ a-steud, arveret e-doug gwazhiedluniñ ar galon hag an talmerennluniñ, diouzh ur c'hellusk herrek (meur a skinlunad dre eilenn).

sérique ◇ **serous** ◇ **~gwadvez**, **~ar gwadvez**, **gwadvez**; **gwadvezel** aa. A-zave d'ar gwadvez.

sérite ◇ **serositis** ◇ **levrgenno** g. Tanijenn ul levrgenn.

séro-anatixithérapie ◇ **serovaccination** ◇ **gwadvezianatoksingurañ** Ensinkladur diaser e daou lec'h kevarall a 'r c'horf eus un doead fonnek a wadvez spesadel hag un doead bihan a anatoksin eus an un spesadelezh, heuliet a-benn un nebeut deizioù gant ensinkladurioù all a anatoksin hepken (hentenn kinniget gant Ramon evit mezegañ an difteriezh hag an tetanoz).

séroconversion ◇ **seroconversion** ◇ **gwadveziamdreñ** Daskemm un pe lies naouuster ur gwadvez; da skouer : dinod pe steuz un antikorfa oa a-gent ezvezant pe vezant er gwadvez-se.

- sérodiagnostic** ◇ **serodiagnosis** ◇ **gwadvezprouad** *g.* Hentenn deznaouiñ diazezet war zinoiñ antikorfoù spesadel e-barzh gwadvez ar c'hlañvour, peurliesañ diwar-bouez an dazgludañ.
- séro-épidémiologie** ◇ **seroepidemiology** ◇ **gwadvezreuziadoniezh** *b.* Diskiblezh o studiañ ar c'hleñvedoù hag ar skignadur anezho, diazezet war arglask an erwezhioù hangaeel a 'r gwadvez.
- sérofibrineux** ◇ **serofibrinous** ◇ **levrfibrinek** *aa.* Amparet gant levrzenn ha fibrin.
- sérofloculation** ◇ **serofloculation** ◇ **gwadvezvalzenniñ** Malzenniñ ur gwadvez dindan un delanvad savelet. Kendaoliñ a ra ar *g.* da savelañ deznaou kleñvedoù arvevadel 'zo.
- sérogroupe** ◇ ◇ **stroll** *g.* **serotipoù** Teskad lies serotip boutin dezho ur barenn naouus.
- sérologie** ◇ **serology** ◇ **gwadvezouriezh** *b.* Studi ar gwadvezoù ha peurgetket an anadennoù hangaeoniel a stader gant ar gwadvez.
- sérologique** ◇ **serological** ◇ **1 gwadvezel** *aa.* **2 gwadvezouriel** *aa.* 1 A-zave d'ar gwadvez. 2 A-zave d'ar wadvezouriezh.
- séromucoïde** ◇ **seromucoid** ◇ **seromukoid** *g.* Unan eus an α -globulinoù gwadvezel o c'hoarvezout eus ar *s.* α_1 , pe orosomukoid, hag eus ar *s.* α_2 , pe haptogloblin.
- séronégatif** ◇ **seronegative** ◇ **gwadveznac'hek** *aa.* A ro un erwezh nac'hek da un pe lies gwadvezprouad.
- séropositif** ◇ **seropositive** ◇ **gwadvezyaek** *aa.* A ro un erwezh yaek da un pe lies gwadvezprouad.
- séroprécipitation** ◇ **precipitin reaction** ◇ **gwadvezdierc'hiñ** Dazgwered dierc'hiñ pa lakaer e diastok un antigen roet hag ur gwadvez ennañ an antikorf dierc'heiat keñverek.
- séroprévention** ◇ **seroprevention** ◇ **gwadvezdizarbenn** Gwadvezkurañ ur gouziviad en ardizh un tredizhad dre zanveziñ gwadvez un arbared. Ne vez ket mui arveret.
- séroprophylaxie** ◇ **seroprophylaxis** ◇ **gwadvezergurañ** Arver erguradel ar perzhioù gwareziñ, prim met berrbad, a zo gant gwadvezoù paot enno an antikorfoù spesadel ouzh ur pore. Ar gwadvezergurañ a c'hell danveziñ ivez gammaglobulinoù eztennet eus ur gwadvez hangaeel.
- NOTENN : Evit aozerion 'zo ez eo damheñvelster *Gl. séroprévention Sz. seroprevention* ha *Gl. séroprophylaxie Sz. seroprophylaxis*. E brezhoneg ez eus un arsterig etre *1 gwadvezdizarbenn* ha *2 gwadvezergurañ*. Gant 1 ez eus anv a herzel un arvar beziat ha gant 2 un arvar erveziat.
- séroprotexion : test cutané de ~** ◇ ◇ **prouad** *g.* **kroc'heneh gwadvezwareziñ** Hentenn o kevaraezañ deznaouiñ goude taol an tifuz eksantematek. Mard eo ar gouziviad dindan c'housesell un ezitifuzeg, e wadvez mesket gant riketsi anialek, ensinklet goude e derm ur c'honikl a skoilh ouzh an erwezh lec'hiek dec'hanet gant ensinkladur riketsi mesket gant gwadvez reol test.
- sérosité** ◇ **serosity** ◇ **levruzenn** *b.* Liñvenn vorc'het gant ul levrzenn pe oc'h ensilañ ar gwad kenglenel (gouliñv) pe epitelet (filboc'henn).
- sérothèque** ◇ ◇ **gwadvezrank** *g.* Dastumad gwadvezoù miret en imboure'hva hag o talvezout da zave evit prouadoù bevoniel diseurt.
- sérothérapie** ◇ **serotherapy** ◇ **gwadvezkurañ** Arver kuradel ur gwadvez hangaeel a orin denel pe loenel. An embregad kentañ anezhañ e voe prederiadur an difteriezh dre ensinklañ ur gwadvez marc'h dreisthangaeel a-enep an toksin difterek.
- sérotonine** ◇ **serotonin** ◇ **serotonin** *g.* Amin o tisoc'h diouzh digarboksilañ ar 5-hidroksitriptofan, bezant er felc'h, er ganol vezhur, er pladanoù. En empenn, ar gouzerc'hvel eo a zo ar brasañ ennañ bec'h ar serotonin. E roll bevedel eo bezañ un nervhanterad. Dasperzhiañ a ra e karkinoid ar vouzellenn voan, e kleñvedoù bred 'zo, e strafuilhoù arc'hwelel ar greuzvenidi, en uswask porzhel ha moarvat ivez er c'hernad, en azoniad Raynaud, en allergiezh, en danijenn. Leteñvel eo ar gweredoù anezhañ ouzh re an histamin. Ezvevennet eo gant an troazh e rezh un deverad, an drenkenn 5-hidroksi-indol-aketek (5HIA), a zo ar bec'h anezhañ (ent reol eus 2 da 9 mg — pe eus 10 da 45 μ mol — dre 24 eurvezh) kresket a-galz e karkinoid ar vouzellenn voan (sl. *carcinoïde : tumeur ~, kétansérine, récepteur de la sérotonine, réserpine et sérotoninémie*).
- sérotoninémie** ◇ **serotoninemy** ◇ **gwadvec'h** *g.* **serotonin, serotoninwadvec'h** *g.* Feur ar serotonin er gwad, ent reol eus 0,10 da 0,30 μ g/mL. Uhelael eo a-galz e karkinoid ar vouzellenn voan.
- sérotoninergie** ◇ **serotoninergy** ◇ **serotoninwerc'hañ** Dilaoskiñ serotonin.
- sérotoninergique** ◇ **serotoninergic** ◇ **serotoninwerc'her** *aa.* A-zave da zilaosk pe da wered ar serotonin.
- sérotype** ◇ **serotype** ◇ **serotip** *g.* Naousterioù ur c'horrvev (bakteri pe viruz) savelet dre e c'henezh antigenel.
- sérovaccination** ◇ **serovaccination** ◇ **gwadvezvaksinañ** Hentenn hangaeañ anezhi ensinklañ kevret un hangaewadvez o tec'han un hangae kenrat hag amzeriat, hag ur vaksin o tec'han un hangae diwezhat ha padus (sl. *séro-anatoxithérapie*).
- serpigneux** ◇ **serpiginous** ◇ **aremstlej** *aa.* Oc'h emastenn treuz-didreuz o widilañ, evel an angreizhoù, an tangouezoù, a bare diouzh un tu hag a emastenn diouzh an tu all, evel pa vijent oc'h emstlejañ.
- serpine** ◇ **serpin** ◇ **serpin** *g.* Ezniñver ar serin-proteazoù.
- Serratia** ◇ **Serratia** ◇ **Serratia** Genad bakteri eus kerentiad an *Enterobacteriaceae*. Spesadoù 'zo anezho (*Serratia marcescens*) a zedaol ul livegenn ruz. Bakteri Gram leiel, emañ ar Serratia en ervez da vezañ kiriek da boreadoù ospitalel grevus.

serratique : **bruit** ~ ◇ ◇ **trouz** g. **heskenn** Hangren a vez a-wechoù gant ar gornailhenn.

Sertoli : **cellule de** ~ ◇ ◇ **Sertoli's cell** ◇ **kellig** b. **Sertoli** Kellig loet e gwiskad speurel an tuellennoù spergaser a ere ar c'helligoù sperbarañ. Kemplezh eo roll ar c'helligoù Sertoli : gouskor ha mezhur ar c'helligoù revel, fagokiterezh, borc'herezh.

sérum : **maladie du** ~ ◇ ◇ **serum disease** ◇ **anaez** g. **diwar wadveiz** Teskad erzerc'hadoù kroc'heneel, arzel ha lounezhel, o c'hoarvezout etre eizh ha dek devezh goude ensinkladdenn gentañ a wadveiz loenel. Anvet c'hoazh *kleñved an hangaegemplezhioù amredat*.

sérum-albumine ◇ **serum albumin** ◇ **gwadveiz-albumin** g. Albumin ar gwadveiz : 42 g/L.

sérum antimicrobien ◇ **antimicrobial serum** ◇ **gwadveiz g. enepgarvev** Hangaewadveiz o tont eus ul loen, enkoret dezhañ meur a wech doenadoù war-gresk a livrizhadoù garvevion marv pe vev a-wechoù hag e-se, vaksinet ouzh ar garvevion-se. Da skouer : *gwadveiz enepstrepokok, gwadveiz enepbosenn*.

sérum antirabique ◇ **antirabic serum** ◇ **gwadveiz g. enepkonnar** Gwadveiz eneppestriek o tont eus kezeg dreisthangaeet, amkanet da brederiañ ar gonnar.

sérum antitétanique ◇ **antitetanic serum** ◇ **gwadveiz g. enepetanoz** Gwadveiz eneppestriek o tont eus kezeg dreisthangaeet, amkanet da brederiañ an tetanoz.

sérum-globuline ◇ **serum globulin** ◇ **gwadveiz-globulin** g. Globulin ar gwadveiz : 30 g/L, o c'hoarvezout eus ar globulinoù α_1 , α_2 , β ha γ .

sérum physiologique ou **sérum artificiel** ou **soluté physiologique** ou **soluté isotonique** ◇ **isotonic solution** ◇ **dileizhad g. kengrennek** Dileizhad halioù (kloridenn natriom peurliesañ) par e c'hrenn ouzh hini ar plasma gwad. Diazas eo an termen gallek *sérum* amañ.

sérum sanguin ◇ **blood serum** ◇ **gwadveiz** g. Plasma gwad difibrinet, dourenn o strilhañ diouzh kaouledenn ar gwad pe a zispartier diouzh ar c'helligoù dre dronizhañ gwad difibrinet.

service ◇ **service, ward** ◇ **1 gwazerezh** g. **2 gwazad** g. **3 gwazadur** g. **4 gwazrann b., rann b. ospital** **5 gwazva** g. 1 Kefridi, labour kaset da benn gant un trevnad tud, ensavadurioù, evel da skouer *gwazerezh foran an ospitalioù*, ar *gwazerezh gwared er gêr*. 2 Gougor pourchaset, da skouer *gwazadoù* ur mezeg, ur glañvdiourez. 3 Rummad gougorioù kinniget da arveried gant un aozadur hag ivez, ar framm e unan. E-se e vo komzet eus *aveadurioù ha gwazadurioù* ur c'*huzulva stroll*, eus *gwazadur ar bank laezh*, eus *gwazadur arouelioù klañvdiour*. 4 Rann en un diazevadur, un ospital, da skouer : *gwazrann guzuliañ diavaez, gwazrann degemer, gwazrannoù arbennikaet ha gourarbennikaet*. Pep gwazrann zo en e benn ur *penn gwazrann*. Komzet e vo ivez eus *gwazrann mezekniezh diabarzh, gwazrannoù surjianerezh*, h.a 5 erziwezh ez eo ar gwazva al lec'h ma emañ ar gwazrann pe ar gwazadur, gant ur burev evit an teulioù da leuniañ, ar peurliesañ.

SESAM ◇ ◇ **Trevnad euvriñ elektronek ar c'hretadur kleñved (TEKK)** Meziant o kevaraezañ d'an embregour sevel war e urzhiaeter (goude bezañ ebarzhet e Gartenn Michereg ar Yec'hed (KaMY) ha Kartenn Kretadur Kleñved *Vitale* (3K) an arval) ur follenn arouelioù elektronek (FAE) a vo treuzkaset dre al linenn bellgomz d'ar C'hef kentaek kretadur kleñved (4K), bennozh d'ar rouedad yec'hed kedvuhez (RYK).

sésamoïde ◇ **1 sesamoid** **2 sesamoid bone** ◇ **1 sezamek** aa. **2 sezameg** g. 1 A denn d'ur c'hreunenn sezam. 2 Askorn sezamek, askornig loet e diabarzh stirennoù 'zo pe e-kefin kenvelloù 'zo a 'n dorn hag a 'n troad.

sessile ◇ **sessile** ◇ **ansezat** aa. A zo stag war-eeun ouzh un organ, kuit a droadenn, da skouer ur *yoc'henn ansezat*. Gant ar bevion unkelligel pe nemeurgelligel e komzer eus *bevion ansezat* pe *ansezaded*, na zilec'hiont ket, festet ma vezont ouzh ur seulad.

séton ◇ **seton** ◇ **seton** g. -où Hordenn reun amkanet da wehennell treuzkroc'heneel, an daou benn anezhi o tremen dre ziv igorenn gevarall war c'horre ar c'hroc'hen da gaout ur gwehennadur. — Dre astenn ster, *gouli rastreuzus* Gl. *plaie en seton*, gouli, forzh pe wezher a ve en e orin, o tremen dindan ar c'hroc'hen hep tizhout organoù all, dezhañ daou zigor, un enank (Gl. *entrée*) hag un ec'hank (Gl. *sortie*).

seuil ◇ **threshold** ◇ **1 gwehin** g. -où **2 gourin** g. -où 1 Bevenn izel un anadenn. 2 Bevenn uhel un anadenn.

Sever : **maladie de** ~ ◇ ◇ **Sever's disease** ◇ **kleñved g. Sever** Balegfo adreñv eus askorn ar seul, seurtad osteokondroz, naouus dre ur poent laurus kantet, un neuz skarrek ha douesaet eus ar broñs askornaat.

séviles ◇ **maltreatment** ◇ **gwanañ** gwallgasadennoù graet war unan bennak gant un den dezhañ aotrouniezh pe atebegezh.

sevrage ◇ **weaning** ◇ **dizonañ** 1 Paouez a vagonn ouzh ar vronn, evit ar vagadelled. 2 Diouerieñ un dramm tamm ha tamm da-geñver ur gur digaezhiañ.

sex binding protein (SBP) ◇ **Testosterone Binding Globulin** or **Testosterone-Estradiol Binding Globulin** or **Sex Hormone Binding Globulin** ◇ **protein o kediañ ouzh an hormonoù revel (PKHR)** Glikoprotein borc'het gant an avu, o kediañ ouzh an hormonoù revel er plasma.

sexdigitisme ◇ **hexadactylia** ◇ **c'hwec'hbiziegezh** b. Ezreolder ganedig, anezhañ bezañ ur biz dorn pe troad dreistniver.

sexe ◇ **sex** ◇ **rev** b. 1 Teskad an naouusterioù a laka kemm etre ar gourev hag ar venev. 2 Hollad an hiniennoù kenrev, ar rev venevel hag ar rev c'hourevel. 3 Organoù genel diavaez.

sexe génétique ◇ **genetic sex** ◇ **rev hilel** Rev desavelet gant ar c'hromozomoù revel, bezañs daou gromozom X evit ar rev venevel, hag ur c'hromozom Y hag ur c'hromozom X evit ar rev c'hourevel.

sexe génital externe ◇ ◇ **rev c'hanadel diavaez** Lankad eus emdroadur ar revelezh oc'h anadiñ etre ar 60vet deiz hag ar 5et miz a 'n enkrozhevzh : an nant troazhañ-genel andiforc'hek a emdreuzfurm en organoù genel diavaez gourevel pe benevel. Ent reol e tesavel ar rev c'hanadel diavaez ar rev gefridiel pe hini marilh ar boblañs.

sexe génital interne ◇ ◇ **rev c'hanadel diabarzh** Lankad eus emdroadur ar revelezh oc'h anadiñ etre ar 50vet hag ar 60vet deiz a 'n enkrozhevzh, dre ziforc'hekadur ar sanioù gonadoforek e sanioù sper ha kellennoù sper pe e krozh ha parzh uhelañ ar gouhin.

sexe gonadique ◇ **gonadal sex** ◇ **rev c'honadel** Lankad eus emdroadur ar revelezh oc'h anadiñ war-dro ar 45et deiz a 'r rizhellvezh, da vare diforc'hekadur an arc'hgonad e klidenn ha vierrez ; treuzfurmatur korfadurel o klotañ ent reol gant ar rev hilel.

sexe nucléaire ◇ **nuclear sex** ◇ **rev c'henrizhel** Rev desavelet gant ar vezañs (rev venevel) pe an ezvezañs (rev c'hourevel) e kraoñell ar c'helligoù somatek eus korfig Barr (pe *korf kromatinel Barr* pe c'hoazh *kromatin revel*).

sexe psychologique ◇ **psychological sex** ◇ **rev vredel** Realezh revel.

sexe somatique ◇ **morphological sex** ◇ **rev neuziadurel** Lankad korfadurel diwezhañ emdroadur ar revelezh, naouus dre zinodadur ar c'hemmoù korfadur etre ar c'houreved hag ar beneved.

sexologie ◇ **sexology** ◇ **revoniezh b.** Studi an anadennoù revel reol hag ezreol, ha prederiadur ar strafuilhoù revel ivez.

sex-ratio ◇ **sex ratio** ◇ **gwezhiader g. gourevelezh** Dregantad jedet evel-henn : niver ar ganedigezhioù gourevel war niver ar ganedigezhioù hollel (e Gl. e vez lavaret ivez *taux de masculinité*, ent resis). Menegomp ar *feur gourevelezh*, par da niver ar ganedigezhioù gourevel war niver ar ganedigezhioù benevel (en degouezh-mañ e klot ar Sz. *sex ratio*, ent resis).

sextane : **fièvre** ~ ◇ **sextan** ◇ **terzhienn b. c'hwec'hvedek** Terzhienn spanaus, dezhi un drovezh c'hwec'h devezh, ur barr o tarvezout bep c'hwec'hvet deiz, gant pevar devezh etre pep barr.

sexualisation ◇ ◇ **revelaat** Dinodadur an arouezioù revel e-doug diorreadur an hinienn.

sexualité ◇ **sexuality** ◇ **revelezh b.** Teskad an doareoù neuziadurel ha bevedel naouus da bep rev.

sexué ◇ **sexed, sexuete** ◇ **revok aa.** Gant ur rev, benevel pe c'hourevel, hag o ouennañ dre araez ar revelezh (*gouennañ revel*).

sexuel ◇ **sexual** ◇ **revel aa.** A-zave d'ar rev pe d'ar revelezh.

sexuels : **comportements** ~ **déviant ou variants** ◇ ◇ **realoù revel forc'hat pe daskenat** Gallout a reer o rummañ pe e *daskemmoù ar realezh arallreviat* (miarc'hwelioù revel) : *reñver ar c'hoant revel* (revestoue, uc'horged, usganadegzh, usrevegezh, darvar, satiriadziz) pe *ar c'hontrol* (yenegezh, dic'halloud) ; pe e *pleustroù heñvelreviat* (kenevoriadegzh, lesbiennezh) ; pe erziwezh el *lezoriadegzhioù* (diskorata, fetichegezh, froteriegzh, maboriadegzh, mazoc'hegezh revel, sadegezh revel, treuzwiskadegzh, gwelata, henadoriadegzh, miloriadegzh, kelanvlisa, troazhvlisa, h.a.).

Sézary : **syndrome de** ~ ◇ **Sézary's syndrome** ◇ **azoniad g. Sézary** Eritroderma debronek ha gourc'hennus o tizhout ar gourev pergen, war-dro 50 vloaz. Kevredet e vez gant c'hwarrannoù ha gant dinodadur leukokit T ezreol hiperkromatek (Gl. *hyperchromatique*) — kelligoù Sézary — er gwad trobarzh, oc'h ensilañ en derm, hep tizhad mel an eskern. Dedreñ a ra d'ar marv dindan un nebeut bloavezhioù.

Sforzini : **syndrome de** ~ ◇ **Sforzini's syndrome** ◇ **azoniad g. Sforzini** Kevredet hêrezhel raklagadegzh hep skoedusvorc'h, kolonislisk ha gagerezh, treuzkaset er mod trec'hek.

SG ◇ **SG** ◇ **SG** Arouez an diri kofigel durc'haet en egor (teirment) ha n'eo ket bannet war ur blaenenn a-dal.

SGOT ◇ **SGOT (serum glutamate-oxaloacetate transaminase)** ◇ **SGOT** Transaminaz glutamek-oksalaketek er gwadveiz.

SGPT ◇ **SGPT (serum glutamate-pyruvate transaminase)** ◇ **SGPT** Transaminaz glutamek-piruvek er gwadveiz.

SH ◇ **SH** ◇ **SH** Arouez neuzahel ar galon durc'haet en egor.

Shapiro et Williams : **syndrome de** ~ ◇ **Shapiro's syndrome** ◇ **azoniad g. Shapiro ha Williams** Anpar ar c'horf karnek gant barradoù iswrez emdarzh, kevret gant c'hwennnoù ha strafuilhoù ar genskiant, desellet gant lod evel ur furm droukfell treuzempennel.

Sharp : **syndrome de** ~ ◇ **Sharp's syndrome** ◇ **azoniad g. Sharp** Kenglennoù erzerc'hadoù lupuz eritematus reizhiad, skleroderma reizhiad ha dermatomiozit. Diforc'hañ a reer azoniad Sharp diouzh ar c'henglennoù diseurt dre ma vez alies un tizhad eus an nervenn drigevell, dre baoted antikorfoù enepkroañell eus ur rizh dibarek, enepribonukleoprotein hag ivez dre ar guñved keñverel anezhañ (gwerc'h ar c'hortikoidoù). Dindan gevarguz emañ e hinienned.

Sheehan : **syndromes de** ~ ◇ **Sheehan's syndromes** ◇ **azoniadoù Sheehan** 1 Skorted rakgougorfennel e dianlen ur gwilioud gwadliñvek gant koempad. Devoudet e vez gant ur varvenn eus ar rakgougorfenn. 2 Ikter grevus o tarvezout adalek 7vet miz ar vec'hiegi, gant steatoz avu lemm marvus.

Sheibe : **syndrome de** ~ ◇ ◇ **azoniad Sheibe** Arsellet e degouezh linoglad ar vrennigenn : c'hoarvezout a ra eus poulzadennoù a-gellusk gant lamm ar galon er skouarn diabarzh, o kenderc'hel e-pad lies sizhunvezh, kevret gant anadennoù foel an daboulin. Araezhañ a ra dinoñ ur vrennigennfo enkelat.

Shelley : **test de** ~ ◇ **Shelley's test** ◇ **prouad g. Shelley** Kalvezder o kevaraezañ lakaat war wel *in vitro* ar gizidigezh ouzh un allergen. Mesket eo an kez allergen gant gwadveiz ar c'hlañvour, a-ziavesk gant bazofil konikl. Mar bez ar gouzrec'h kizidikaet ouzh an allergen e koll ar bazofil o greunennadoù.

- Shepherd** : fracture de ~ ◇ **Shepherd's fracture** ◇ **torr g. Shepherd** Torr balegoù adreñv an askorn fer, ar baleg kostezel pergen.
- Shiga** : bacille de ~ ◇ **Shigella dysenteriae** ◇ **bazhell b. Shiga** Bazhell Gram —, gwezher ar flus darreuziat, anvet evit an arbenn-se flus bazhellel (sl. *Shigella* ha *shigellose*).
- Shigella** ◇ **Shigella** ◇ **Shigella** Genad bakteri Gram— eus kerentiad an *Enterobacteriaceae*, rannet e pevar spesad : *S. dysenteriae* (bazhell Shiga), *S. flexneri* (bazhell Flexner), *S. boydii* (bazhell Boyd) ha *S. sonnei* (bazhell Sonne).
- shigellose** ◇ **shigellosis** ◇ **chigelloz g.** Flus bazhellel diwar *Shigella dysenteriae* (sl. *dysenterie*).
- Shillingford** : syndrome de ~ ◇ **Shillingford's syndrome** ◇ **azoniad Shillingford** Kalonistead dispizel tremeniat o tarvezout a-wechoù e deroù angwaziad ar c'haheer kalon. A orin damugel e ve, devoudet gant isvec'h oksigen ar c'haheer kalon.
- shin-splint** ◇ **shin-splint** ◇ **amaskornennfo g. ar skin** pe **azoniad laurus ar skin** Koeñv laurus e talbenn arak ar c'har, dianlen ur strivad divoas a-berzh ur sportour. Desellet e vez gant lod evel un torr a-drastenn diahed a 'r skin.
- Shone** : syndrome de ~ ◇ **Shone's syndrome** ◇ **azoniad g. Shone** Kammneuziad kalon o kevrediñ un trapig mintrek e stumm harz-lamm, ur walenn stirek isvullus us-trapig eus ar c'hentez kleiz, un isvull is-aortenn hag ur goudag a 'n aortenn.
- SHORT** : syndrome ~ ◇ **SHORT syndrome** ◇ **azoniad g. SHORT** Gwreskanv ar Sz. *Short stature, hyperextensibility of joints and/or inguinal Hernia, Ocular depression, Rieger anomaly and Teething delay*. Teskad dibaot a gammneuziadoù treuzkaset hervez ar mod aotozomek enkilek, o c'hoarvezout eus gwariadenn Rieger, eus ur goulerc'h korfadur hag ur goulerc'h dentadur, eus un dreistkizidigezh a 'n arzoù, eus ur barlennogad, eus drekadur an daoulagad ha stumm tric'hornek an dremm.
- Shouldice** : opération de ~ ◇ **Shouldice procedure** ◇ **oberatadenn b. Shouldice** Kalvezder dazluniañ ar barlennogad e teir zalenn, dindan dieraeziñ lec'hiek.
- Shulman** : syndrome de ~ ◇ **Sulman's syndrome** ◇ **azoniad g. Shulman** (sl. *pseudosclérodermie à éosinophiles*).
- shunt** ◇ **shunt** ◇ **heptreugañ, skoeviñ** Tremen gwad, naturel pe wezhiet gant ar surjianerezh, etre daou barzh a 'r bevedeg, enno gwaskoù kevarall (etre un dalmerenn hag ur wazhienn, da skouer), bennozh d'un amdreug. Graet e vez ivez gant ar termen *dasforzhañ* evit a sell ar surjianerezh. A hent all ez eo damheñvelster an daou hanc'her *skoeviñ* hag *heptreugañ*, ha graet e vez ivez gant o deveradoù : *skoev, skoevad, heptreug*. — *heptreug dehou-kleiz* pe *skoev dehou-kleiz* : tremen ar gwad gwazhiennel er gwad talmerel (pevardezh Fallot). — *heptreug kleiz-dehou* pe *skoev kleiz-dehou* : tremen ar gwad talmerel er gwad gwazhiennel (san dalmerel, da skouer). — *skoev daoudu* : kevredet daou skoev gindu, unan o vezañ trec'h ar peurliesañ.
- shunt** : effet ~ ◇ **venous admixture** ◇ **gwered g. heptreug** Tremen er gwazhiennoù skevent eus ur c'hementad bras pe vrasoc'h a wad anoksigenet, diwar zrestpad amred ar gwad e korrwazhied ar skevent en un taread angwentet eus ar skevent, da skouer da heul ur skoilh er bronkez pe er c'horrvronkez. Diwar an aoz ezreol-se e tisoc'h ul leiadur eus peurvec'hiadur ar gwad en oksigen en amred bras, en ervez da gas d'an olksigen ha da skorted dehou ar galon.
- Shwachman, Patterson et Laguna** : test de ~ ◇ ◇ **proud g. Shwachman, Patterson ha Laguna** Hentenn arglask an tripsin en oulennoù, diwar-bouez koazhadur ur film gelatin. Kevaraezañ a ra diurnat aes kenan isvorc'h diavaez an ilgreiz.
- Shwachman-Diamond** : syndrome de ~ ◇ **Shwachman-Diamond syndrome** ◇ **azoniad g. Shwachman-Diamond** Anez hêrezhel, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, o kevrediñ ur skorted ilgreizel diavaez gant dilerc'h kreskiñ hag askornvibar hag un olneutrofil.
- Shy et Drager** : syndrome de ~ ◇ **Shy-Drager syndrome** ◇ **azoniad g. Shy ha Drager** Miemrenegezh o tizhout dreist holl ar gourev war-dro 50 vloaz, o tevoudañ un iswask warsavel, un dic'halloud ha strafuilhoù ar c'helc'hstrishaerioù, kevredet gant un azoniad ampikernennek, pikernennek pe ilpennel. Devoudet eo an anaez-se gant un dic'henezhadur eus gronnoù struzhel ar mel hag eus kef an empen.
- Sia** : réaction de ~ ◇ **Sia's test** ◇ **dazgwered g. Sia** Dazgwered malzenniñ en dour strilh a zevoud dierc'hadur euglobulinoù ar gwadveiz. Yaek evit ar c'hala-azar, ar baludegezh, ar c'hirroziou ha makroglobulinemiezh Waldenström. Dispredet eo ar proud-se.
- sialadénite** ◇ **sialadenitis** ◇ **halvwagrennfo g.** Tanienn un pe lies gwagrenn halviñ.
- sialagogue** ◇ **sialogogue** ◇ **halvec'holer g. -ioù** Lia o fonnaat borc'hañ an halv.
- sialidose** ◇ **sialidosis** ◇ **sialidoz g.** Anez hêrezhel diwar un divigad enzimatek (sialidaz). Un oligosakaridoz eo.
- sialite** ◇ **sialitis** ◇ **sialit g.** Tanienn ur benvegad halviñ (gwagrenn ha san).
- sialodochite** ◇ **sialodochitis** ◇ **sialodokit g.** Tanienn san degorzhañ ur wagrenn halviñ, ar peurliesañ diwar vezañs ur c'hrouanenn e-barzh ar san degorzhañ. — *s. fibrinek* : devoudet gant steviadur ar san degorzhañ diwar un hogennad fibrinek linek. Erzerc'hañ a ra ent klinikel dre ur roegell lemm.
- sialogène** ◇ **sialogenous** ◇ **halveiat aa.** O tec'han borc'hadur an halv.
- sialographie** ◇ **sialography** ◇ **halvluniñ** Skinluniñ sanioù degorzhañ ar wagrennoù halviñ goude ensinklañ enno un danvezenn Xdemer.
- sialolithe** ◇ **sialolith** ◇ **halvvaen g.** Grouanenn halv.

sialométaplasie ◇ **sialometaplasia** ◇ **halvdreweañ** Treweañ ar gwagrennoù halviñ. — *h. marvennis* : gouliez kuñv lec'hiet er stavn, a neuz foel ha marvennel, bevennet gant un andell, o tennañ d'ur c'harkinom ; an imbourc'h gwiaoniel a anata un trewe eus an adwagrennoù halviñ.

sialorrhée ◇ **sialorrhœa** ◇ **halvusorc'hañ** (sl. *ptyalisme*).

siamois : **frères** ~, **sœurs** ~es ◇ **siamese twins** ◇ **breudeur pe c'hoarezed siamat** Anv zo a *c'hevelled siamat*, termen kaozeek evit ar c'hevelled kendiñvat (Gl. *jumeaux conjoints, jumeaux accolés*).

sibilance ou **rôle sibilant** ◇ **sibilant rale** ◇ **ronk g. c'hwibanus** Ronk sec'h, dezhañ un ton skiltr, o taskounañ an avel o c'hwibanat. Naous eo da lankad deroù ur bronkezfo hag an astma, oc'h azonañ un isvoll eus ar c'horrvronkez.

Sicard : **épreuve de** ~ ◇ ◇ **prouad g. Sicard** Skindeznaou an anaezioù enlivennel dre araez ensinkladur Lipiodol®, liñvenn eoulek iodin demer ouzh ar skinoù X, heloc'h hervez savlec'h ar c'hlañvour hag a chom a-sav ouzh bevenn ar skoilh e degouezh a amwask ar mel a-livenn.

SICARD : **syndrome** ~ ◇ **SICRET syndrome** ◇ **azoniad g. SICRET** Gwreskanv ar Sz. *Small Infarctions of Cochlear, Retinal and Encephalic Tissue* Br. *angwazhiadoù bihan e gwiad ar velc'houedenn, al luc'hsae hag an empenn*. Anaez dibaot, dianav e orin, o tizhout ar beneved yaouank, o c'hoarvezout *ent korfel* a angwazhiadoù bihan dianlenat da steviadoù talmerel liesel, arreat, lec'hiet hepken en empenn, el luc'hsae hag er skouarn diabarzh. *Ent klinikel*, war-lerc'h ul lankad a empennaoued lemm, azonet gant arouezioù annonek diseurt, e tisoc'h an dedro war un envedi kevredet gant usdamoug ha strafuilhoù ar c'herzhed, ar gweled hag ar c'hleved.

SIDA (syndrome immunodéficitaire acquis) ◇ **AIDS** ◇ **HAZA** pe **haza g. (HANGaeZivig Arzeuat)** Azoniad an hangaezivig arzeuat : leiadur an difennoù hangae, dianlen da zistruj al limfokit T4 gant viruz an hangaezivig arzeuat denel (VIHAD), retroviruz eus kerentiad al lentiviruz. Al limfokit T4 zo amplegat da azvedigezh rummennoù all a limfokit T ha d'an darn vuiañ eus al limfokit B, lec'h parañ an antikorfoù. Pa vez gougorzhed an difennoù hangae, da-geñver ar poreoù, ez a al limfokit T4 e brasoc'h ardirzh ar VIHAD. An ishangae o c'hoarvezout da heul a ro tro da boreoù all, alese an anv a roer d'ar re-mañ a gleñvedoù koulzataer. Tredizh an HAZA a vez graet dre ar sper, ar gwad, al laezh. Ar viruz VIHAD a ra d'ar bevedeg parañ antikorfoù na spiront ket da neptiñ ar viruz. Bezañs an antikorfoù-se a lakaer war wel diwar-bouez prouadoù diournat ; met n'eus araez ebet c'hoazh evit dinoñ bezañs ar viruz en ur bevedeg. Ar gouziaviad a zizoloer an antikorfoù VIHAD en e wadvez a lavarer ez eo gwadvezizaek ; pa vez kuit a antikorfoù, ez eo gwadveziznac'hek.

SIDA (Sacro-Iliaque Droite Antérieure) ◇ **Right Sacro Anterior Position (RSA)** ◇ **K.D.K (Kroazell-klun Dehou a-raok)** Lakadur enankañ dibaot eus erload ar revr, an askorn kroazell o vezañ troet war gostez dehou al lestr hag a-raok.

sidéen ◇ **AIDS patient** ◇ **1 hazaek aa. 2 hazael aa. 1 hazaeg g. -eion** 1 A zo tizhet gant an haza. 2 A-zivout an haza 3 gouziaviad tizhet gant an haza.

sideration ◇ **sideration** ◇ **darvigañ, darvigad g.** Astal trumm ha klok eus arc'hwelioù un pe lies organ (tredandrankañ, foeltrañ, gwadliñv empenn, h.a.).

sideration du myocarde ◇ **stunned myocardium** ◇ **darvigad ar c'halongaher pe kalongaher darviget** Miarc'hwel darnel hag eiltroüs ent emdarzh a r'c'hofig kleiz da heul un heskwad lemm anezhañ. Arsellet e vez a-wechoù an anaez dibarek-se en ezvezañs nep angwazhiad, er skorted kurunerel pe en amveziadoù evel an ilgreizfoioù lemm, ar gwadliñvoù empennpilhonel, ar bleuzioù, h.a.

sidérmie ◇ **sideraemia** ◇ **gwadvec'h g. houarn, houarnwadvec'h** Bec'h an houarn er gwadvez : gant ar gourev, eus 55 da 170 µg/100 mL ; gant ar venev, eus 50 da 160 µg/100 mL.

sideroblaste ◇ **sideroblast** ◇ **sideroblast g.** Eritroblast oc'h enderc'hel en o c'hitoplasm greunennadoù houarn anhemoglobinel, hewel goude livadur Perls (livrezh glas prusian).

sideroblastose ◇ ◇ **sideroblastoz g.** Bezañs sideroblast er gwiadoù diseurt eus ar c'horf.

siderocyte ◇ **siderocyte** ◇ **siderokit s.** Eritrokit enno houarn anhemoglobinel.

sideronécrose ◇ ◇ **houarnvarvennañ** Marv ur gellig devoudet gant un usvec'h houarn re vras. Arsellet e vez e degouezh ar sideroz avu.

sideropénie ◇ **sideropenia** ◇ **olhouarn g., houarnisvec'h g.** Leiadur bec'h an houarn, ent dibarek er gwadvez.

sideropexie ◇ **sideropexy** ◇ **houarnlenañ** Lenañ houarn er c'helligoù pe er gwiadoù.

siderophage ◇ **siderophage** ◇ **siderofag s.** Makrofag enno ebarzhennoù houarnin.

siderophilie ◇ **siderophilia** ◇ **houarnlended b.** Lenidigezh ouzh an houarn.

siderophore ◇ **siderophore** ◇ **siderofor s.** Makrofag, hemosiderin enno.

siderose ◇ **siderosis** ◇ **sideroz g.** Ensiladur ar gwiadoù gant uloc'hioù houarn dewtet pe gant aozadoù houarnin.

— *s. avu* : ensiladur kelligoù ha gwiadoù kenglenel an avu gant livegennoù houarnin, o tarvezout e-doug an hemokromatozioù.

— *s. skevent* : analeuflegez devoudet gant dewtetadur uloc'h houarn o c'hoarvezout gant ar souderion, al lufrierion vetaloù, h.a.

siderosilicose ◇ **siderosilicosis** ◇ **siderosilikoz g.** Ensiladur ar skevent gant uloc'hioù paot an halioù houarn enno ha silika, arsellet gant ar vicherourion o labourat er mengleuzioù houarn.

sidérothérapie ◇ **ferrotherapy** ◇ **houarngrañ** Arver yac'hadel an houarn hag ar c'hediadoù anezhañ.

siderurie ◇ **sideruria** ◇ **troazhvec'h g. houarn, houandroazhvec'h g.** Bezañs pe feur an houarn en troazh. Izel kenan eo ar c'hementad houarn dioulet dre an troazh, izeloc'h eget 11 µmol pe 600 mg dre 24 h.

sidologue ou **sidénologue** ◇ ◇ **hazaour g. -ion, hazaourez b. -ed** Arbennigour war an haza.

SIDP (Sacro-Iliaque Droite Postérieure) ◇ **Right Sacro Posterior position (RSP)** ◇ **KDV (Kroazell-klun Dehou a-dreñV)** Lakadur enankañ eus erload ar revr, ar paotañ war-lerc'h ar KKK (Kroazell-klun Kleiz a-raoK), an askorn kroazell o vezañ troet war gostez dehou al lestr hag a-dreñv.

SIDT (Sacro-Iliaque Droite Transverse) ◇ **Right Sacrum Transverse presentation (RST)** ◇ **KDZ (Kroazell-klun Dehou a-dreuz)** Unan eus seurtadoù erload ar revr, an askorn kroazell o vezañ troet war gostez dehou al lestr hag a-dreuz.

Siemens : syndrome de ~ ◇ **Siemens's syndrome** ◇ **azoniad g. Siemens** Keratoz bolc'hennel spernanek moalaus. Ur c'hleñved hêrezhel eo, treuzkaset hervez ar mod trec'hek, X-ereet.

siemens ◇ **siemens** ◇ **siemens g.** Unanenn rended, arouez S, ginad an om (unanenn an dredanharzded).

sievert ◇ **sievert** ◇ **sievert g.** Unanenn ar c'hevatal doenad luget e bevoniezh, par da 100 rem, Sv he arouez.

sifflement ◇ **wheezing** ◇ **sutad g.** Trouz an anal ezreol merzhadus a-hed an analerezh hag alies a-bell, e-doug isvolloù ar bronkez, dezhañ lies hangren : sutañ, roc'hal, bourbouilhat, trouz rasklerez pe trouz strakerez, h.a.

SIGA (Sacro-Iliaque Gauche Antérieure) ◇ **left Sacro Anterior position (LSA)** ◇ **KKK (Kroazell-klun Kleiz a-raoK)** Unan eus seurtadoù erload ar revr, an hini paotañ, an askorn kroazell o vezañ troet war gostez kleiz al lestr hag a-raok.

Sigaud : aileron de ~ ◇ ◇ **angell b. Sigaud** Disneuiziad amparet gant baliradur ar c'hostennoù diwezhañ devoudet gant ur c'hof bolzennek.

sigmatisme ◇ **sigmatism** ◇ **sefleañ** Distagadur diaes pe siek al lizherenn S.

sigmoïde ◇ **sigmoid** ◇ **1 kornloarek aa. 2 sigma aa. & g.** 1 Un trapig kornloarek (Gl. *semi-lunaire, sigmoïde*) zo un trapig talmerel o kehentaat ur c'hofig hag ar gwazhied o loc'hañ eus ar galon. Daou drapig kornloarek zo : an trapig aortek etre ar c'hofig kleiz hag an aortenn hag an trapig skeventel etre ar c'hofig dehou ha kef ar skevent, pep trapig o c'hoarvezout eus teir sac'hell gornloarek. 2 Ar c'holon sigma zo ur parzh eus ar c'holon, ur c'hilbleg e stumm S lec'hiet etre poull ar glun kleiz hag al lestr bihan. Emañ war-lerc'h ar c'holon a-ziskenn en nec'h hag e kehent gant ar youlc'h en traoñ.

sigmoïdectomie ◇ **sigmoïdectomy** ◇ **ezvenañ ar c'holon sigma, sigmaezvenañ** Dazbidañ, darnel pe hollel, ar c'holon sigma.

sigmoïdite ◇ **sigmoïdit** ◇ **sigmafo g.** Tanijern ar c'holon sigma.

sigmoïdofibroscope ◇ **sigmoïdofibrescope** ◇ **sigmoïdofibroskop g.** Fibroskop arveret da imboureñ hiñ rageun ar c'holon sigma.

sigmoïdofibroscoPie ◇ **sigmoïdofibrescopy** ◇ **engweliñ ar c'holon sigma, sigmaengweliñ** Imboureñ h gweledel ar c'holon sigma diwar-bouez ar sigmoïdofibroskop.

sigmoïdostomie ◇ **sigmoïdostomy** ◇ **ezforzhañ kolon sigma, sigmaezforzhañ** Savelañ un adfraezh surjanel war ar c'holon sigma ouzh ar c'hroc'hen.

signal-symptôme ◇ **signal-symptom** ◇ **azon g. ditour** Azon o kevaraezañ delec'hiañ sez un anaf eus an nervgreizzennoù (kridoù o teraouiñ atav dre an un rannbarzh en droukfell jaksonek).

signe ◇ **sign** ◇ **arouez b. -ioù** Nep erzerc'had ur c'hleñved stadadus ent engorel gant ar mezeg, hag ent dibarekoc'h, nep anadenn delankadus diarvenn gant ar mezeg e sell d'un deznaou. Da ziforc'hañ diouzh an azon a zo anglevet ent dangorel gant ar c'hlañvour. Heñvelster eo *azon* hag *arouez*. — **signe de...** sl. an anvenn den.

SIGP (Sacro-Iliaque Gauche Postérieure) ◇ **left Sacro Posterior position (LSP)** ◇ **KKV (Kroazell-klun Kleiz a-dreñV)** Unan eus seurtadoù erload ar revr, dibaot kaer, an askorn kroazell o vezañ troet war gostez kleiz al lestr hag a-dreñv.

SIGT (Sacro-Iliaque Gauche Transverse) ◇ **left Sacrum Tranverse presentation (LST)** ◇ **KKZ (Kroazell-klun Kleiz a-dreuz)** Unan eus seurtadoù erload ar revr, an askorn kroazell o vezañ troet war gostez kleiz al lestr hag a-dreuz.

silenceur ◇ **silencer** ◇ **goudaver g. -ioù** Kemalad DNA dezhañ ur gwered skoilhañ, kontrol da hini ar muiaer, dezhañ ur gwered kentraouiñ.

silicatose ◇ **silicatosis** ◇ **silikatoz g.** Analeuflegezh diwar dewentañ uloc'h silikatoù (alumin, raz, magnezia, kali, h.a.).

silicose ◇ **silicosis** ◇ **silikoz g.** Analeuflegezh diwar dewentañ uloc'h silika, angemeret evel kleñved micherel (taolenn n° 25 hag 25 eil).

silicotique ◇ **silicosis** ◇ **1 silikozek aa. 2 silikozeg g. -eion 3 silikozel aa.** 1 Gant ar silikoz. 2 Gouziviad ar silikoz. 3 A-zave d'ar silikoz, da skouer : *fibroz silikozel, greunennad silikozel* (anaf spesadel ar silikoz), *skeventad silikozel, riskl silikozel*, h.a.

silico-tuberculose ◇ **silicotuberculosis** ◇ **silikotorzhellegezh** Silikoz rouestlet gant un dorzhellegezh skevent.

sillons de la gale ◇ **acarina borrow** ◇ **irvi an hakrez** Anafoù kroc'hen linennek, naouus d'an hakrez, klazet en ezkroc'hen gant parez ar sarkopt a sank enno he vioù, o tibenniñ gant un dosennig.

sillon unguéal ◇ **Beau's line** ◇ **linenn b. ivinel** Linenn diadrez war an ivin a stumm gant al loarig, o testiñ hended an darez a zo en he orin hag o kevaraezañ deiziadiñ ar reuzenn. Erzerc'haat a ra ur gorrekadur pe ur paouez kreskiñ a 'n ivin, diwar daralladur pleuskenn an ivin.

Silver-Russel : **syndrome de** ~ ◇ **Silver-Russel syndrome** ◇ **azoniad g. Silver-Russel** Korreded c'hanedigel gant ezreolderioù neuziadurel hag isganadegezh dianav an arbenn anezhi.

Silverman : **syndrome de** ~ ◇ **Silverman's syndrome** ◇ **azoniad g. Silverman** Azoniad arsellet gant mabaned wallgaset pe prederiet fall tra ken pe maget fall pe marteze dezho ur vresked a 'n eskern ezreol. C'hoarvezout a ra eus lies torr en ervez da lezel arlenadoù padus, askornarzel, nerverl, dremmel pe lagadel.

Silverman-Andersen : **indice de** ~ ◇ **Silverman's index** ◇ **ditourenn b. Silverman-Andersen** Gwerzhad o kevaraezañ andalañ, gant an nevezc'haned, grevusted un azoniad ankalez analadel, dre engwerc'hañ brasted an entenn etre-kostoù, hini an entenn is-lech, goubredadur ar fiñvoù analañ kofel ouzh ar vr uskuel, fiñvadennoù eskell ar fri, ar c'hunuc'hañ ec'hanael. Pep hini eus ar 5 elfenn-se zo feuriet eus 0 da 2; seul c'hrevusoc'h stad an nevezc'haned ma 'z eo uheloc'h ar werzhad hollel.

Silvester : **méthode de** ~ ◇ **Silvester's method** ◇ **hentenn b. Silvester** Kalvezder deanalañ gant an daouarn arveret e-pad pell evit defraouiñ ar veuzidi. Daouarn ar gouzrec'h (en drekgourvez) a lec'hier a-us d'e benn, e doare da lakaat aer da enteñ e kavenn ar bruskl, ha goude en o izelaer hag en o fouezer war ar bruskl. Adober a reer ar c'hefleñvad 16 gwech dre vunud.

Silvestrini-Corda : **syndrome de** ~ ◇ **Silvestrini-Corda syndrome** ◇ **azoniad g. Silvestrini-Corda** Teskad strafuilhoù enborc'hadel kemplezh a-zalc'h gant ur skorted avu diwar ur c'hirrozo.

Simmonds : **maladie de** ~ ◇ **Simmonds's cachexia** ◇ **kleñved g. Simmonds** Skorted rakgougorfennel grevus, gant daralladur argammedek ar stad hollek o vont betek ar fallezh.

Simonin : **épreuve de** ~ ◇ **Simonin's method** ◇ **hentenn b. Simonin** Hentenn desavelañ ur rizh gwad ABO, anezhi devoudañ dazgludadur hematî a rizoù anavezet gant ar gwadvez dindan imbours'h. Ret eo he c'hroaziañ gant hentenn Beth-Vincent.

simulateur ◇ **malingerer** ◇ **fincher g. -ion, darneuzier g. -ion** An hini a ra van da vezañ klañv, da c'houzañv diwar un diaez.

simulation ◇ **simulation** ◇ **1 darvanañ 2 finchañ, darneuziañ** 1 Arverañ un delvan e plegennoù ma 'z eo dic'hallus an arnod war ur reizhiad werc'hel. 2 Dreveziñ ent emouez azonoù ur c'hleñved, ar peurliesañ gant ur pal flodus.

Simuliidae, Simulidés ◇ **Simuliidae** ◇ **Simulideged l. (g.)** Kerentiad amprevaned eus urzhad an Dipter a c'hell bezañ ar genad *Simulium* anezho, en Afrika pe e Kreiz- pe e Suamerika, trezouger an onkokerkoz. Flemmadennoù ar c'hwibu du ha tort-se (ar *simuli* Gl. *simulies* Sz. *black fly*), o fardiñ alies e koumoulad, a vez en ervez da zevoudañ ar *simuliidoz*, un derzhienn dispuilhat a wikfe bistrîel pe allergek.

simultagnosie ◇ **simultagnosia** ◇ **kenwelandenaoud g., andenaoud gwelout diaser** Koll ar galloud da welout lies traezenn war un dro, da welout un draezenn en he vloc'helezh, da genwelout ur senenn.

sinapisation ◇ ◇ **sevnadell b.** Ruziadur ar c'hroc'hen devoudet gant irad sezv. — *prouad s.* : steuz ar ruziadur-se war an tiriadoù kroc'hen e diouer nervaouadur (dic'henezhadur un nervenn drobarzh).

sinapisme ◇ **sinapism, mustard plaster** ◇ **telt g. sevnnet, anro g. sevnnet, tarchelad g.** Palastr gant ar sezv da elfenn diazez, amkanet da zec'han ar ruziañ pe an destrummañ.

Sinding Larsen-Johansson : **maladie de** ~ ◇ **Larsen-Johansson disease, patellar chondropathy** ◇ **kleñved g. Sinding Larsen-Johansson** Askornad kuñv a 'r padellek arsellet gant ar grennarded, gant arzfoeñv ar glin ha kaheisteñv ar gigenñ bevarfennek.

sine materia ◇ **sine materia** ◇ **sine materia** Hep arbenn anat.

sinistrose ◇ **revendication nevrosis** ◇ **sinistroz g.** Termen hollek o teanviñ daralladurioù bredel pe strafuilhoù dangorel a-berzh reuzidi an darvoudoù labour, hentred pe brezel, gant tuedoù arc'hus oc'h erzerc'hañ e sell da glask dic'haouadurioù lezennevezegel.

sinu-aortique : **syndrome** ~ ◇ **aortic sinus syndrome** ◇ **azoniad g. god an aortenn** Vaganad devoudet gant ur striv gant gouzrec'hidi dezho un usdamoug eus god an aortenn.

sinucarotidien : **syndrome** ~ ou **sinucarotidienne** : **syndrome d'hyperréflexivité** ~ ◇ **carotid sinus syndrome** ◇ **azoniad g. god ar garotidenn** pe **azoniad usdamoug god ar garotidenn** Vaganad en ervez da vont betek arsav ar galon hag an analañ, dre fraouidigezh damougalf god ar garotidenn.

sinus ◇ **sinus** ◇ **1 kev g. 2 god g. 3 aspleg g.** Furmadr neuziadurel kleuz, kavenn, hag ent dibarek : 1 aergavennoù e-barzh eskern 'zo eus an dremm (*kev ar garvan*). 2 Frankaenn ur wazhiedenn wad pe limf (*god kuruner; god keviaouek*). 3 Er gorfadurezh, kavennig o klotañ gant ur bogod pe un emouinadur (*aspleg perennek*), a-wechoù kilbleg amparet gant kemm durc'hadur un organ (*aspleg ar c'hrezoù*).

sinus : **maladie du** ~ ◇ **sick sinus syndrome** ◇ **kleñved g. ar c'hlom god-kentez** Erzerc'had kleñvedel a-zalc'h gant ur miarc'hwel eus ar c'hlom god-kentez evel delanker korvez ar galon, pe dre astal ar c'hlom (si e danzeadur ar broud), pe dre un treuzkas fall eus ur gentrigenn reol d'ar c'hentez (tolc'had god-kentez). Emañ kleñved ar c'hlom god-kentez en ervez da zevoudañ rastridoù, trolernioù, vaganadoù hag ezwalioù zoken. Kevredet e c'hell bezañ gant erzerc'hadoù usvroudadusted

kentezel (kalonustead, krehad, ha dibaotoc'h gougren) : anv zo neuze a gleñved korvezel ar c'hentez (sl. *maladie rythmique atriale, syndrome bradycardie-tachycardie* ha *Mandel : technique de ~*).

sinus caveux : **syndrome de la paroi externe du ~** ◇ **Foix's syndrome, cavernous sinus syndrome** ◇ **azoniad g. peur diavaez ar god keviaoek, azoniad Foix** Lagadseizi gant azoniad Claude Bernard-Horner, seizi an nervenn bellaat, seizi nervenn loc'hañ al lagad ha barr a-lagad an nervenn grillevell, arsellet e tromboz ar god keviaoek. Devoudet e c'hell bezañ ivez gant ur yoc'henn loet kefin pe gant un darvoll a'r garotidenn.

sinus coronaire ◇ **coronary sinus** ◇ **god g. kuruner** Frankaenn dibenn gwazhienn vras ar galon a zifourk e kentez dehou ar galon etre an trapig tribroudek ha hini ar wazhienn gav izelañ. Deoueriañ a ra ar gwad o tont eus kaher ar galon hag eus ar c'hurunerennou.

sinus pilonidal ◇ **pilonidal sinus** ◇ **kist g. blevolc'hel** Anvet ivez *kist kroazell-belost* : kist evodet diouzh ur volc'henn vlev, sezet er rannbarzh kroazell-belost. Ar peur anezhañ, amparet gant un epitelienn bikaoueg ha haenek, zo en ervez da vezañ blev ennañ ha da sanfañ en er groazell, tre betek pilhonenn dev al livenn.

sinus urogénital ◇ **urogenital sinus** ◇ **god g. troazhañ-genel** Gant ar rizhell, parzh a-gof ar c'hloak goude bezañ tilhennet, ma tifourk ar san lez-krennlounezh ha san ar grennlounezh. An kez parzh a amparo ar c'han troazh, ar c'hwezhi-gell, ha hervez an degouezhioù, ar raksavenn pe rakkambr ar gouin hag un darn eus ar gouin.

sinus venosus ◇ **sinus venosus** ◇ **god g. gwazhiennel** Seurtad kehentad etrekentezoù uhel, ar ribl uhelañ anezhañ o vezañ en arun gant frankaenn ar wazhienn gav uhelañ, kevredet gant un distro gwazhiennel ezreol, an holl pe un darn eus gwazhiennou dehou ar skevent o tifourkañ er c'hentez dehou pe er wazhienn gav uhelañ.

sinusal ◇ **sinusal** ◇ **godel g.** A-zave d'ur god, hag ent dibarek da glom god-kentez Keith ha Flack, lec'h orin argrezañ bonan ar galon.

sinusectomie ◇ **resection of a sinus** ◇ **kevezvenañ** Dazbidañ darnel speurioù ur c'hev lez-fri.

sinusite ◇ **sinusitis** ◇ **kevfo g.** Tanijenn, lemm pe henek, ar glaourgenn o pallennañ ar c'hevioù lez-fri.

sinusographie cérébrale ◇ **sinusography** ◇ **godluniñ an empenn** Skinluniñ godoù gwazhiennel enklouennel, *rageeun*, goude ensinklañ un aozad dargemm demer ouzh ar skinou X er god a-saezh uhelañ a-drebarzh d'ar feunteunig (gant ar vagadell); pe *ameeun* dre ensinklañ entalmerennel an danvezenn demer en un dalmerenn o vont d'an empenn.

sinusotomie ◇ **sinusotomy** ◇ **kevenbenañ** Skejañ surjanel ur c'hev lez-fri.

Supple : **syndrome de ~** ◇ **Supple's syndrome** ◇ **azoniad g. Supple** Azoniad naous dre gevredet ur c'hankr mezonel a'r skoedenn (100%), ur feokromokitom (50%) hag un adenom arskoedennel (35%). Nevezwe enborc'hadel a rizez, dianlenad un dargenn eus ar c'henenn AET (Br. *Adtrevnet E-doug Treuzteññ, Sz. RET Rearranged during Transfection*), treuzkaset hervez ar mod aotozomek trec'hek.

sirénomèle ◇ **sirenomele** ◇ **sirenomel g. -ed** Euzheg a zo ur voñsenn gemennek e-lec'h an daou ezel traoñ, an treid hag an organoù troazhganadel o vezañ ezvezant penn-da-benn.

sirop ◇ **syrop** ◇ **siros g. -où** Angevezh apotikel dre zour, ennañ ur c'henfeur sukr uhel.

SISI test ◇ **Short Increment Sensitivity Index test** ◇ **prouad g. SISI** Prouad klevaldalañ oc'h arverañ ur c'hresk tremeniat, dibad ha korvezek eus kreñvder ur sten kendalc'hek. E degouezh a zazgrenaat ez eo an disoc'h brasoc'h eget hini ar gouzrec'h bonan (sl. *recrutement*).

sismothérapie ◇ **sismotherapy** ◇ **1 froumleuñviñ, froumgorañ 2 tredangridañ** 1 Hentenn leuñviñ oc'h arverañ froumoù, gant an dorn pe gant binvioù arbennik. 2 Evit prederiañ bredanaezioù ha psikoziù 'zo e vez arveret strofisoù : tredansakañ en empenn. Ur c'halvezder heñvel, arloet ouzh ar bruska, a arverer er Galonouriezh : tredansakañ ar galon a-dreuz d'ar bruska (sl. *choc électrique, électrochoc*).

sismothère ◇ ◇ **tredangrider g. -ioù** Ardivink amkanet da zec'han an tredangridañ.

sistostérol ◇ **sistosterol** ◇ **sistosterol g.** Sterol bezant en eginou an edeier hag a c'haller treuzfurmiñ, dre skinata, en un danvezenn leteñvel ouzh ar vitamin D.

situs incertus ◇ **situs incertus** ◇ **situs incertus** Kammloadur ar flugez, ansavelet avat (a-c'hindu emañ organoù 'zo, tra m'emañ reoù all en o lec'hiadur boas, ha reoù all c'hoazh en ul loadur kreizer ezreol), kevredet gant kammneuziadoù eus ar galon hag ar felc'h.

situs inversus ◇ **situs mutatus, situs inversus** ◇ **situs inversus** Kleñved ganedigel o tarvezout er c'hanedigezh, naous dre c'hinload an organoù hag ar flugez, hollel (Br. *situs inversus hollel* Gl. *situs inversus completus* pe *situs inversus totalis*) pe darnel (sl. *inversion*).

situs sagittalis ◇ **situs sagittalis** ◇ **situs sagittalis** Furm a loadur ezreol ar galon, ar gern anezhi loet en hantervusk dehou dre berzh dehouc'hweladur ar c'hofigoù en dro da wazhied bras an diaz (aortenn ha kef ar skevent), a vir o lec'hiadur reol (sl. *mésocardie*).

situs solitus ◇ **situs solitus** ◇ **situs solitus** Loadur bonan, boas, an holl organoù.

Sjögren : dystrophie réticulaire pigmentaire de ~ ◇ ◇ **mideñv g. rouedadel livegennel Sjögren** Ezreolder hêrezhel al luc'hsae, treuzkaset moarvat hervez ar mod aotozomek enkilek ; naouus eo dre ul livegadur stalet e rouedad e par blein adreñv ar voull lagad, hep ma ve darallet ar gweled. Kevret e vez alies kammneuziadoù lagad all ha bouzarmuderezh.

Sjögren et Larsson : syndrome de ~ ◇ **Sjögren-Larsson syndrome** ◇ **azoniad g. Sjögren ha Larsson** Anaev ganedigel, treuzkaset hervez ar mod aotozomek enkilek, naouus dre un dilerc'h bred, un iktioz hag un treuzseizi dasstrizhek, gant a-wechoù un dic'henezhadur brizhennel.

skélgalgie paresthésique ◇ **skelalgia paraesthetica** ◇ **eskerost g. kammeraezek** Mieraezioù teñvel e tiriad an nervenn a-splihenn boutin, nes d'ar morzhedost kammeraezek.

skénite ◇ **skenitis** ◇ **skenit g.** Tanijenn gwagrennoù Skene (gwagrennoù ar c'han troazh).

skiascopie ◇ **skiascopy** ◇ **skiaskopiñ** Hentenn ergorel da zesavelañ barr gouskogañ al lagad, dre imboure'hîñ dilec'hiadur skeud ar mab lagad dewerc'het dre vannañ un hordenn luc'h war al lagad.

Skinhoj : syndrome de ~ ◇ ◇ **azoniad g. Skinhoj** Furm lec'higek azoniad talmerenn arak al livenn, naouus dre ur c'haheisteñv argammedek ent gorrek eus an izili traoñ gant steuz an damougoù a-stirenn, kuit a vieraez.

skodique : bruit ~ ou **skodisme** ◇ **skodaic resonance** ◇ **trouz g. skodaek** Sten taboulin skañv diwar giziata kern ur skeventenn vonan e degouezh krezenno gant ur fennad krezenn a fonned argrenn.

Slavjansky : membrane de ~ ◇ **Slavjansky's membrane** ◇ **kennenn b. Slavjansky** Anvet ivez *diazkennenn ar volc'henn*, kennenn dev o tispertiañ an haen c'hreunek diouzh an toag diabarzh.

Slocum : épreuve de ~ ◇ **Slocum's test** ◇ **prouad g. Slocum** Prouad dialuskel a zistabilled c'hweleñ ar c'henvell skin-morzhed diavaez.

Slocumb : syndrome de ~ ◇ **Slocumb's syndrome** ◇ **azoniad g. Slocumb** Barradoù skuizhnez mareadek, kevredet gant laurioù en arzoù, er c'higennoù ha distabilled an noa, gwellaet gant ar c'houssked. Arsellet e vez gant gouzviaded mezeget e-pad pell gant kortikoidoù.

Sluder : névralgie ou syndrome de ~ ◇ **Sluder's syndrome or neuralgia** ◇ **nervost g. pe azoniad g. Sluder** Seurtad dremmost o rouestlañ a-wechoù ur c'hevfo genneg. Naouus eo dre laurioù e gwirzienn ar fri, el lagad, e dent ar garvan, o saezhenniñ etrezek ar gouzoug ha kevredet gant un darwazh eus glourgennoù ar fri (friver) hag al lagad (gant a-wechoù mabusvoll untu). Steuziañ a ra gant diaraeziañ ar gangrenn elvenneg-stavn.

smegma ◇ **smegma** ◇ **smegma g.** Danvezenn arwenn, tev, keuzennek, trenk ar c'hwezh anezhi, lec'hiet e deun aspleg ar veskenn gant ar gourev hag en dro da vuzelloù bihan ar c'hourzh gant ar venev, diwar hogennadur kelligoù epiteled gourc'hennet.

Smith : signe de ~ ◇ **Smith's sign** ◇ **arouez b. Smith** Sourr gwazhiennel merzhet e par dornell ar glerenn gant ar vugale tizhet gant c'hwarrennoù briant-bronkez torzhellek, pa vez o fenn pleget kaer war dreñv.

Smith, Lemli et Opitz : syndrome de ~ ◇ **Smith-Lemli-Opitz syndrome** ◇ **azoniad g. Smith, Lemli hag Opitz** Korredet c'hanedigal treuzkaset hervez ar mod aotozomek enkilek a rizh heneuz, gant ezreolderioù ar bleñchoù, kammneuziadoù diseurt hag un dilerc'h bred muiek.

Smithwick : opération de ~ ◇ **Smithwick's operation** ◇ **oberatadenn g. Smithwick** Dazbidañ an nervennoù splanknek hag un hanrann eus ar c'hef simpatek gavalet etre an 8vet kangrenn a rusk hag ar 1^{añ} kangrenn a n dargeiz lakaet e-barzh. Ar wezhiadenn-se a veze kaset da benn a bep tu e-ser div abadenn kenheuilh, da barraat ouzh an uswask talmerel padek hennadek. He dilezel a reer tost da vat (sl. *Poppen* : *opération de* ~).

smryidose ◇ ◇ **smiridoz g.** Analeuflegezh diwar zewentañ uloc'h emeri.

SNAC ◇ **Scaphoid Nonunion Advance Collapse** ◇ **GAGAS** GAouGenvell Arbadet ar Skafeg (Gl. *pseudoarthrose évoluée du scaphoïde carpien*). Disoc'hañ a ra gant goustouad ar skafeg (Sz. *snac wrist*), a zo bet ergemennet da vezañ prederiet dre un ensteud e pirokarbon.

Sneddon : syndrome de ~ ◇ **Sneddon's syndrome** ◇ **azoniad g. Sneddon** Kevredet ul livedo rouedek hag orc'hadoù emenn. Azoniad Sneddon a c'hell gougevaniñ en azoniad an antikorfoù fosfolipidek.

Snider : test de ~ ◇ **Snider's match test** ◇ **prouad g. Snider** Prouad diourmat strafuilhoù ar gwenterezh skeventel. Warlerc'h un enanaladenn don e rank ar gouzrec'h c'hwezhañ buan, e c'henoù digor bras, ur sklosenn lec'hiet 15 cm dirazañ war-bouez nebeud.

sociogenèse ◇ **sociogenesis** ◇ **kevredadienezh b.** Roll ardaolet ouzh ar parennoù kevredadel e dinodadur ar strafuilhoù bred.

sociothérapie ◇ **milieu therapy** ; **therapeutic community** ◇ **kevredadkurañ** Teskad an araezioù arveret da zaskemmañ metoù kevredadel ar gouzviad gant amkanioù yac'hadel, evel da skouer an oberiezhoù strollennel er metoù ospitalel.

sodé ◇ **sodic** ◇ ~ **soda, natrium, natriomin aa.** Gant soda pe natriom.

sodium ◇ **sodium** ◇ **natriom g.** Elfenn gimiek a niverenn atom 11, a arouez Na. Evel ar c'haliom, emañ an natriom e kerentiad ar metaloù alkaliek, oksidadus kenan enta. Koll a ra un elektronenn evit tremen er stad stabil a ionenn natriom Na⁺, bezant e kediaoù niverus ha paot kenan en natur, evel da skouer ar gloridenn natriom (NaCl), arveret evel hollen er boued. Hezilezh kenan en dour e tasperzh an ion Na⁺ e lies dazgwered bevgimiek a-zalc'h gant kennevid an dour, ar c'hempouez trenkek-bazek, h.a.

- sodoku** ◇ **sodoku** ◇ **sodokou** g. Kleñved boutin e Sina hag e Japan, arsellet ivez a-wechoù en Amerika hag en Europa. Deraouiñ a ra eus 1 da 3 sizhunvezh goude brazhad ur razh, dre ur barrad terzhienn, gant ur resmiad foel e par ar poent enkoriñ; un nebeut devezhioù diwezhatoc'h ez anad un dispuilhad hollek a blakennoù ruz, heuliet gant ur wellaenn herrek. War-lerc'h un nebeut devezhioù angwrester e tarvez ur frapad terzhiennek nevez leteñvel ouzh an hini kent ha ne zeu ar pare nemet goude pevar pe pemp barrad eus ar seurt. Ar c'hleñved-se, marvus a-wechoù, anvet ivez *spirilloz* (Gl. *spirillose*), zo devoudet gant ar vazhell Gram leiel *Spirillum minus*, treuzkaset d'an denion dre vrazhadoù ha krabisadennoù razhed.
- sodomie** ◇ **sodomy** ◇ **sodomiezh** b. Kediañ fraezhel.
- sœur Joseph** ou **Marie-Joseph** : **nodule de** ~ ◇ **sister (Mary) Joseph's nodule** ◇ **nozeleñn** b. ar **c'hoar Joseph** Dassez begel ur c'hankr flugezel, ar c'hof pe al lestr.
- Sohval-Soffer** : **syndrome de** ~ ◇ **Sohval-Soffer syndrome** ◇ **azoniad** g. **Sohval-Soffer** Teskad kammneuziadoù o kevredañ ul labanded, lies ezreolder eskern o tizhout dreist holl mellennoù ar gouzoug hag ar c'hostoù, un isganadegezh gant isteñv an tuellennoù spergaser.
- soi** ◇ **self** ◇ **unev** g. ; **unevded** b. Glad hangaeel spesadel pep hinienn.
- soif** : **épreuve de la** ~ ◇ ◇ **prouad** g. ar **sec'hed** En diabet heuz, argrennañ an diedoù ne leia ket an ustroazh; dec'han a ra en un nebeut eurvezhioù un azoniad dourisvec'h lemm.
- soignant** : **personnel** ~ ◇ **nursing staff** ◇ **koskor** g. **arouelañ** Hollad ar vezeion hag ar c'hoskoriou lezvezegel oc'h arouelañ ar c'houziviaded.
- soin** ◇ **care** ◇ **arouelañ**, **kurañ**, **prederiañ**; **arouel** g. -ioù, **preder** g. -ioù, **prederiadur** g. -ioù Gread amkanet da drezerc'hel pe da assav ar yec'hed.
- soin direct** ◇ **direct care** ◇ **arouelañ rageun** Arouel renet war ar gouziviad e unan.
- soin indirect** ◇ **indirect care** ◇ **arouelañ ameeun** Labour kaset da benn a-bell diouzh ar c'hlañvour, o kendaoliñ d'ar prederioù gougoret dezhañ.
- soins ambulatoires** ◇ **ambulatory care** ◇ **arouelioù baleadel**, **prederioù baleadel** Arouelioù graet e ti ur c'hlañvour a c'hell mont d'an arouelva pe er c'hurdi, kuit a glañvdiadur.
- soins curatifs** ◇ **curative care** ◇ **prederiadurioù yac'haat** Arouelioù amkanet da bareañ ar c'hleñved.
- soins éducatifs** ◇ **educational care** ◇ **prederiadurioù desavadurel** Displegadurioù ha kuzulioù amkanet da wellaat ar yec'hed ha da atizañ ar c'hlañvour da ren e unan arouelioù 'zo evitañ.
- soins infirmiers** ◇ **nursing** ◇ **arouelioù klañvdiour** Arouelioù renet gant ur glañvdiourez pe ur c'hlañvdiour, e sell da ziegelaat, ar muiañ gwellañ, hevoud korfel, bredel ha kevredadel ar gouziviad.
- soins de santé primaires** ◇ **primary health care** ◇ **arouelioù kentael** Arouelioù diazez o klotañ gant live kentañ ar reizhiad yec'hed riez. Soliañ a reont war an ergurañ ha perzhiadur strollennel ar poblañsoù, oc'h engwezhiañ atav kudenn ar c'houst.
- soins de support** ◇ **supportive care** ◇ **arouelioù ambroug** Teskad an arouelioù ha gouskoriou rekis d'ar glañvourion e-kichen ar prederioù spesadel, pa vez, hed-ha-hed ar c'hleñvedoù grevus (kelc'hlizher n° DHOS/SDO/2005/101 eus an 22 c'hwevrer 2005) (sl. *accompanement*).
- Sokolow et Lyon** : **indice de** ~ ◇ **Sokolow-Lyon index** ◇ **ditourenn** b. **Sokolow ha Lyon** Sammad niveroniell heledoù RV₅ ha SV₁ war ar c'halonvarrezad. Mar bez an ditourenn uheloc'h eget 35 mm ez eus un usteñv eus ar c'hofig kleiz.
- sol** ◇ **sol** ◇ **sol** g. -ioù Dileizhenn pe arluggenn golloidel en ur metoù liñvel. En ur metoù aezhel e reer gant *aerosol* (sl. *gel*).
- solaire** : **syndrome** ~ ◇ **solar syndrome** ◇ **azoniad** g. **plezhad ar poullkreuz** Azoniad oc'h erzerc'haat un hegadur eus plezhad ar poullkreuz, diseurt an arbennoù anezhañ, naouus dre laurioù grezvarrek e rannbarzh kreizer uhelañ ar c'hof, kevret gant c'hweladoù hag un tuadur d'ar c'hoempad. Arsellet e vez e-doug an tabez, an aortennfo kofel, kankroù er rannbarzh.
- solarium** ◇ **solarium** ◇ **heolgurva** g., **solarium** g. Diazevadur heolgurañ.
- Solomon et Fretzin** : **syndrome de** ~ ◇ **epidermal nævus syndrome of Solomon, Fretzin and Dewald** ◇ **azoniad** g. **Solomon ha Fretzin** Nevuz kevredet gant kammneuziadoù all : kroc'hen, flugez, eskern ha nervoù. Bez' ez eo un nevuz gwenaennek linennek, dibaotoc'h un nevuz soavel Jadassohn pe iktioz *hystrix*. Eلفennoù all an azoniad zo nervel (barradoù droukfell hollek pe lec'hiek diouzh tu an nevuz, dilerc'hegezh vred, empennfoeñv a-wechoù, direizhoù loc'hadel pe bouzarded), lagadel (yoc'henn ar gevresae, demerennoù ar gornsa, kolobom) pe askornel (treuzwar, kammneuziadoù mellkein, ezreolderioù gourizoù an izili krec'h ha traoñ).
- soluté** ◇ **1 solute 2 solution** ◇ **1 dileizhed** g. -où **2 dileizhad** g. -où 1 En un dileizhenn, an danvezenn war zileizh, e kemm diouzh an *dileizher*. 2 El liaoniez, dileizhenn danzeet dre zileizhiñ un pe lies danvezenn liael en un dileizher azas.
- solvant** ◇ **solvent** ◇ **1 dileizher** aa., **dileizhus** aa. **dileizher** g. -ioù, **dileizhuzenn** b. 1 A c'hell dileizhiñ un danvezenn all. 2 Danvezenn liñvel dileizhus.
- soma** ◇ **soma** ◇ **soma** g. Hollad ar bevedeg, lakaet er-maez ar c'helligoù hag ar gwiadoù o tasperzhiañ er gouennañ.
- somation** ◇ **paravariation** ◇ **arzeuadeg** b. Hollad an doareennoù arzeuat e-doug diorreadur ur bevedeg, hep ma teufent da vezañ hêrezhel, eleze o taskemmañ ar soma hep delanvad war ar germen, na pa ve aznevezet an doareennoù-se en ur c'henheuliad hir a remziadoù.

- somatisation** ◇ **somatization** ◇ **kreudelaat** Argerzh amdreiñ strafuilhoù pe genniñvoù bredel en azonoù arc'hwele kreudel.
- somatognosie** ◇ **somaesthesia** ◇ **korfdenaoud** g. Denaout e gorf piaouel a-berzh pep hinienn, kenskiant eus e emgorf.
- somatoméline** ◇ **somatomedin** ◇ **somatomedin** g. **-eier** Hormon polipeptidek borc'het gant an avu, diziouerus e vezañs er gwad d'an hormon kreskiñ da gaout ur gwered bevedel war ar migorn. Ar somatomedin, nes d'ar proinsulin, a c'hoarvez eus div zanvezenn : an IGF1 hag an IGF2.
- somatoparaphrénie** ◇ **somatoparaphrenia** ◇ **somatoparafreniezh** b. Strafuilh ar c'horfdenaout ma ardaol ar c'hlañvour d'unan all estregetañ piaou un ezel klañv.
- somatopleure** ◇ **somatopleure** ◇ **somatopleur** g. Gant ar rizhell, unan eus div feilhenn ar mezoderm o vevennañ ar c'helom war an diavaez, eben o vezañ ar splanknopleur en dro d'ar flugez. En dalenn greizer e kensout an div feilhenn en ur gandedenn.
- somatostatine** ◇ **somatostatin** ◇ **somatostatin** g. Hormon tetradekapeptidek heuder borc'hadur gougorfennel an hormon kreskiñ hag an hormon skoedwezher. E par an ilgreiz e skoilh dilaosk an insulin, ar glukagon hag ar gastrin. E adkavout a reer e gwidoù diseurt : ilgreiz, kruz, pervez, rannbarzhioù diseurt eus an nerveg kreiz. Berradur : SRIF (Sz. *somatotrophin releasing inhibiting factor*), GHRH (Sz. *growth hormone releasing inhibiting hormone*).
- somatostatine-insuline-glucose** : **test** ~ ◇ ◇ **proud** g. **somatostatin-insulin-glukoz** Proud amkanet da andalañ kizidigezh an diabeitein hag ar vorreion ouzh an insulin. Trefennañ doenadoù anavezet a somatostatin, a insulin hag a c'hluoz a gevaraez andalañ, dre live stabilaat ar glukozwadvec'h, kizidigezh kennevid ar glukoz ar c'hlañvour ouzh an insulin ensinklet, borc'hidigezh an insulin gant ilgreiz ar gouzrec'h o vezañ bet astalet gant ar somatostatin.
- somatostatinome** ◇ **somatostatinoma** ◇ **somatostatinom** g. Yoc'henn o vorc'hañ somatostatin.
- somatotrope** ◇ **somatotropic** ◇ **somatotropek** aa. E bevoniezh, o werediñ war ar c'horf, war gelligoù ar soma, o kevaraezañ kresk ar c'horf pergen.
- somatotrope** : **hormone** ~ ◇ **Growth Hormone (GH)**, **human Growth Hormone (hGH)** ◇ **hormon** g. **somatotropek** Kavout a reer an heñvelsterioù : *somathormon*, *somatotrofin*, *somatostimulin*, *hormon kreskiñ*. Bevenaozet ha borc'het gant kelligoù eozinofil tolbezenn araok ar c'hougorfenn e fraoua an kez hormon kresk ar c'horf. Ur gwered ennevidus zo dezhañ war ar protidoù ha gwerediñ a ra war ar c'hempouezioù fosfor-kalkiom, glukidek ha lipidek. Berradurioù : GH (Sz. *growth hormone*), STH (Sz. *somatotropic hormone*).
- somesthésie** ◇ **somaesthesia** ◇ **korferaeziñ** Anvet ivez *eraeziñ korfel* ez ampar ar c'horferaeziñ unan eus reizhioù eraeziñ ar bevedeg (kroc'heneh hag endonel), kevenebet ouzh an arc'hweleoù skiantennel. C'hoarvezout a ra eus : an eraeziñ gorrefraouadel (stekiñ, gwask, tomm, yen), an eraeziñ anunfraouadel (kaherel ha stirennel) hag an eraeziñ laurel.
- sommation** ◇ **summation** ◇ **berniañ** Aznerzhañ stad broudadur un neuronenn loc'hañ pe ur stroll neuron loc'hañ, dec'hanet dre arren an nervlanv o tont eus an un tiriad skiantennel (berniañ amzerel), pe dre gengerc'h an nervlanv o tont eus tiriadoù skiantennel kevarall (berniañ egorel).
- sommation** : **bruit** ou **galop de** ~ ◇ ◇ **trouz** g. **a-vernial** (sl. *bruit de sommation*).
- sommeil** ◇ **sleep** ◇ **huniñ**, **kousket** ; **hun** g., **kousk** g., **kousked** g. Stad vonan oberiat a assav, naouus dre spanaenn, trovezhiekg hag eiltrois, eus ar genskiant hag eus ar gedvuhez, evit erwezhañ ouzh un ezhomm diskuizhañ a-berzh ar bevedeg. En ur ser ez eus ur steuz bras pe vrasoc'h eus an eraeziñ hag ur gorrekadur eus an darn vrasañ eus arc'hweleoù ar beved. An empennvarrezañ a gevaraez dinoñ lankadoù a gousked gorrek, o naouiñ dre ur gorrekadur hag ur goubredadur eus ar gwagennoù, ha lankadoù a gousked herrek (pe diac'hinek), enno un disgoubredadur eus an dresenn gant gwagennoù herrek, un istant kaherel muiel, fiñvoù herrek eus an daoulagad ha hunvreoù.
- sommeil** : **cure de** ~ ◇ **sleep therapy** ◇ **kur** b. **gousked**, **hungur** b. Kalvezder yac'hadel amkanet da zevoudañ an hun dre ziounit hunwezherioù e-pad un amzer etre dek hag ugent devezh, ar c'housked o padout eus 15 da 18 eurvezh bemdez, troc'het gant predoù boued, prantadoù yec'hedouriezh ha dalc'hoù bredkurañ.
- sommeil** : **maladie du** ~ ◇ **african trypanosomiasis** ◇ **kleñved** g. **ar c'houk** Pore broreuziat en Afrika gehederel diwar enkoradur gant ar gelienenn *Glossina palpalis* eus *Trypanosoma gambiense*. Anvet ivez *morgoñv Afrika* (Gl. *léthargie d'Afrique*) pe *tripanosomiaz denel* (Gl. *trypanosomiasse africaine*) e tedro ar c'hleñved e daou lankad ; emañ an hini kentañ o naouiñ dre resmiadoù terzhienn direoliekg, usvent ar felc'h hag ar gwerblennoù, eritemoù, debron ha strafuilhoù bred, leteñvel ouzh re derou an envedi beluzel ; dibaot ha diheverzh eo tizhad ar galon ; imbours'h ar gwad a araez dinoñ bezañs an arvevaded, ha hini al liñvenn benn-kein a ziskouez ul limfokitoz. D'an eil lankad ez anad ar c'hloppennost, an ankewant ha, dreist holl, ar barradoù kousked hir ouzh hir a zisoc'h gant ar marv.
- somnambulisme** ◇ **somnambulism** ◇ **hunvaleerezh** g. Oberiezh korf diarzoug, kenurzhiet mui pe vui (ar c'herzhed pergen), o tarvezout e-pad an hun gorrek don, hep m'en defe ar gouzrec'h an disterañ koun anezhi o tihuniñ.
- somnifère** ◇ **hypnotic**, **soporific** ◇ **1** **huneiat** aa. **2** **huneiat** g., **hunwezher** g. **-ioù** 1 O tec'han ar c'housked. 2 Lia o tec'han ar c'housked.
- somniloquie** ◇ **somniloquism** ◇ **hungomzerezh** g. Komz diarzoug e-doug ar c'housked.
- somnolence** ◇ **somnolence** ◇ **morvor** b., **dargud** g. Stad a vored skañv, diaes da drec'hiñ dezhi avat, liesseurt an arbennoù anezhi.

- sonde** ◇ **sound, catheter, probe, lead** ◇ **sont** g. Benveg bouk pe reut, kranennek, ennañ ur san pe get, amkanet da imboure'hiñ ar c'hanolioù naturel pe zarvoudel, da wehenniñ ar c'hwezhi-gell, pe c'hoazh da gateteriñ.
- sonde génétique, sonde moléculaire** ◇ **DNA probe** ◇ **hilsont** g. Tammad DNA tiellet gant ur c'horf skinoberiek pe gant un enzym war-bouez spislec'hiañ ur c'henenn.
- Sones : technique de F.** ~ ◇ **Sones's procedure** ◇ **kalvezder** g. **Sones** Argerzhad kurunerluniñ diuzel ma 'z eo ebarzhet ar sont dre dalmerenn ar vrec'h dehou, goude bezañ he diguzhet.
- Sonnenburg : point de** ~ ◇ ◇ **poent** g. **Sonnenburg** Poent loet war tu dehou ar c'hof, er c'henskejad etre al linenn divgribennglun ha ribl diavaez ar gigenn eeun hag a glot gant an divilhenn.
- sonnette : signes de la** ~ ◇ ◇ **1 & 2 arouez ar c'hloc'hig 3 arouez an nozeleenn bouezañ** 1 Arouezioù skinselladel a skorted aortek naouus, da-geñver pep sistol, dre un argrizañ kreñv eus kern ar galon, tra ma c'hoarvez gant an aortenn (ar wareg uhelañ kleiz pergen) un azledad nerzhiek. An daou fiñv-se a zebard' an tolzad kofigoartenn fiñv ur c'hloc'hig dor rizhek kenan. 2 *Arouez ar c'hloc'hig balerel* : skrampadur talmerenn ar vrec'h a-gellusk gant ar sistol, hewel e par pleg an ilin gant gouziviaded 'zo tizhet gant an arterioskleroz. 3 Laur lec'hiek o saezhenniñ a-goazez dre ur pouezañ tuvelennel e live an tachad etrespennenn, ma emañ an diskogad kiriek d'ur mavigamm mellkeinel boutin.
- sonométrie** ◇ **sonometry** ◇ **1 klevandalañ 2 sonometriezh b. 3 stenventañ, tregerventañ** 1 Muzuliañ lemmded ar c'hleved. 2 Hentenn briziañ digorded ar gorzenn glevedel. 3 Muzuliañ tregern ar stenioù.
- sonores : râles** ~ ◇ **sonorous rale** ◇ **ronkoù sec'h, ronkoù frañvus** Seurtadoù ronkoù bronkezel, roc'hvanek, c'hwibanus, a-gevenep d'ar ronkoù mouest pe vouilhek. O c'hlevout a reer da geñver daou lankad an analerezh, e-doug ar bronkezoù, an asma hag ar bronkezusvoll.
- sonotrode** ◇ **sonotrode** ◇ **sonotrod** g. Sont ec'hoder usstenioù, a c'hoarvez eus teir elfenn stalet a-steud : un *treuzrezhier* oc'h amdreñ ar gremm tredanel e froumoù treloc'hel ; un *amplaer* evit amplaet an dilec'hiadoù hag ur *sonotrod* o c'houlankañ an keff dilec'hiadoù d'ar metoù.
- sophrologie** ◇ **sophrology** ◇ **soprologiezh** b. Studi hag arver yac'hadel an azlamm war ar genskiant hag ar bevedeg eus kalvezderioù bredkreudel diseurt evel ar goudreñ, an arlaoskiñ, ar yoga hag ar zen.
- soporeux** ◇ **soporos** ◇ **morvitellek** aa. O naouiñ dre ur vorvitell don, nes d'ar c'homa. Anv a reer eus ar *c'hleñvedoù morvitellek*, naouus dre ur stad komaek.
- soporifique** ◇ **soporific** ◇ **1 huneiat** aa. **2 huneiad** g. **-où, hunwezher** g. **-ioù** 1 O tec'han ar c'housked. 2 Lia o tec'han ar c'housked.
- Soriano : périostite déformante ou syndrome de** ~ ◇ **periostitis deformans** or **Soriano's syndrome** ◇ **amaskornennfo** g. **disneuzius** pe **azoniad** g. **Soriano** Anaev naouus ent klinikel dre goevadurioù askorn amaskornennek liesel hag ent skinourel dre hiperostozioù ha douesadurioù askorn, rouestlet diwezhatoc'h gant isvent askornarzel.
- Sorsby : dégénérescence maculaire pseudo-inflammatoire de** ~ ◇ **Sorsby's macula degeneration** ◇ **dic'henezhadur** g. **brizhenn gaoufoel Sorsby** Tolgennkornsaefo foel kreiz heuliet gant isteñv brizhenn al luc'hsac.
- souche bactérienne** ◇ **strain of bacterium** ◇ **skod g. bakteri** Kludad garvevien evodet eus an un elfenn dastumet war ur c'hlañavour, lakaet da neriñ dre azhadadoù lerc'h-ouzh-lerc'h war meteier tiñvañ kevarall.
- souffle**¹ ◇ **murmur, souffle** ◇ **sourr** g. **-où** Anv genadel an trouzioù merzhet da-geñver ar selaouennañ, ent dibarek evit a sell ar galon hag ar skevent, a denn d'an trouz graet gant an aer o vont er-maez eus ur vegin.
- souffle**² ◇ **blast** ◇ **fuc'h** g. Rutenn devoudet gant ur blokad, ur wagenn edrur — anvet c'hoazh : gwagenn vlosk, blokavel, aerstroñsad, c'hwa —, ur wagenn wash diasavel, o c'hoarvezout eus ur wagenn gentañ a wash muiel, berrbad, bras he heled, kleñvedus, heuliet gant ur wagenn a wash leiel, hep pouezded klañvvedourel (sl. *blast injury, blessure par souffle, accident du souffle*).
- souffle anémique** ◇ **anaemic murmur** ◇ **fuc'h g. amwadel** Sourr kalon ec'hanafel, sistolek ar peurliesañ, a vez klevet gant gouziviaded an amwad, forzh pe arbenn a ve dezhañ.
- souffle anorganique** ◇ **functional murmur, inorganic murmur, innocent murmur** ◇ **sourr ec'hanafel pe sourr arc'hwelel pe sourr anorganel** Sourr sistolek klevadus en ur poent diforzh eus ar gorread argalonel, gant ur gouzrec'h hep ezreolder kalon ebet.
- souffle cardiopulmonaire** ◇ **cardiopulmonary murmur** ◇ **sourr kalon-skevent** Sourr ec'hanafel avaezkalon, dec'hanet e lavnenn ar skevent loet dirak ar galon, diwar an didenn anezhi e mare ar sistol.
- souffle continu cave supérieur** ◇ ◇ **sourr diastal ar wazhienn gav uhelañ** Sourr diastal kreñv kenan, a nerzhadur dibenn-sistol, sezet er parzh lez-klerenn eus an eil hag an trede tachad etrekostoù dehou hag o saezhenniñ etrezek ar gazel dehou dreist holl. Ditouret eo bet gant gouzrec'hioù tizhet gant an aortennfo pe gant ar poullkreizfo. Devoudet e ve gant amwash ar wazhienn gav uhelañ.
- souffle d'éjection** ◇ **ejection murmur** ◇ **sourr an diflistrañ** Sourr sistolek devoudet gant un isvoll eus ar gwask aortek pe a-skevent. Stumm ul lankell zo dezhañ war ar galonstendresenn (a se an anv *sourr lankellek*). A-gevenep dezhañ emañ *sourr ar gousilhañ*.

- souffle mitro-aortique** ◇ **mitroaortic murmur** ◇ **sourr mintrek-aortek** Sourr o saezhenniñ eus ar gern war-du an nec'h e degouezh a ensiladur arteriosklerozek anisvöllus eus gwask an aortenn.
- souffle de régurgitation** ◇ **regurgitant murmur** ◇ **sourr ar gousilhañ** Sourr sistolek devoudet gant ezvountañ endalc'had ar c'hofig war un tu diforc'h diouzh tu bonan red ar gwad, a-dreuz d'un igorenn gleñvedel. Da skouer : ar sourr sistolek a skorted vintrek-tribroudek ha hini ar c'hehented etre-kofigoù. Holosistolek eo ar sourr-se, o teraouiñ gant trouz kentañ ar galon hag oc'h echuiñ gant an eil; alies e vezont masklet gantañ. War ar galonstendresenn ez eus ur stumm reizhkornek (*sourr reizhkornek*). A-gevenep dezhañ emañ *sourr an diflistrañ*.
- souffle tubaire** ◇ **bronchial murmur** or **bronchial respiration** ◇ **sourr korzennek** Sourr kreñv ha garv an hangren anezhañ damheñvel mui pe vui an trouz graet o c'hwezhañ en ur gorzenn, merzhet o selaouennañ ar skevent e par un annon douesadennoù skevent.
- souffle tunellaire** ◇ **machinery murmur** ◇ **sourr stlejerez** Sourr diastal o testiñ dreistpad ar san dalmerel (sl. *canal artériel : persistance du ~*).
- souffle utérin** ◇ **uterine murmur** ◇ **sourr krozh** Sourr flour, goubred da lamm kalon ar vamm, merzhet o selaouennañ ar grozh e mizvezhioù diwezhañ ar vec'hiegi, devoudet gant tremen ar gwad e talmerennoù ar grozh.
- soufre** ◇ **sulfur** ◇ **sulfur g.** Elfenn divetal, niverenn atom = 16, tolz atom = 32, 066, kalet diouzh an doareoù ordinal, a gaver anked en natur pe e rezh sulfidennoù zink, houarn, h.a.
- Soulier et Boffa** : **syndrome de ~** ◇ **antiphospholipid syndrome** ◇ **azoniad g. Soulier ha Boffa** Sioc'haniñ arreat ha trombozioù gwazhiedel e dalc'h un enepkaouleder amredat.
- soulier** : **signes du ~** ◇ ◇ **arouezioù ar votez** 1 E degouezhioù a arzfo henek eus al lez gant dic'halluster da blegañ, ar c'hlañavour, evit lakaat e votez, eeun e lez, a rank kas e droad war ziadreñv ha war grec'h. 2 E degouezh a zivilhennfo henek, plegañ ar c'horf war raok ret evit lasañ ar botoù a zevoud ul laur e poull ar glun dehou (argrezad ar gigenn a-loan).
- soumission chimique** ◇ **chemical submission** ◇ **sujidigezh b. kimiek** Gwered drammoù 'zo diounezet ar peurliesañ hep gouzout d'ar reuzied, o tec'h an ur c'houzañvadezh da-geñver darwantadoù revel hag un ankoun o kempleshaat an enklask lezenn-vezegel. Niverus eo an aozadoù arveret : benzodiazepinoù, tetrahydrokannabinol, opiomakeged, GHB (γ -hidroksibutirat natriom) hag ar c'hevelerioù anezhañ, h.a.
- Soupault-Bucaille** : **opération de ~** ◇ ◇ **oberatadenn b. Soupault-Bucaille** Oberatadenn Henley dewerc'het war ur c'hlañavour kreuzezvenet hervez gwezhiadenn Polya ha dezhañ strafuilhoù koazhadel treloc'hel. Difourkan dasforzhad kreuzpervez a vez lezet er sez; hogen ar c'hilbleg ezkasat anezhañ er yunegenn, skejet, a vez dasforzhzet ouzh skarvenn an daouzegenn, war-benn adsavelañ an treug dre an daouzegenn; araezet eo kendalc'hegezh ar yunegenn diwar-bouez krafaelañ kilbleg degasat kent difourk an dasforzhad kreuz-pervez ouzh rann bellek ar c'hilbleg ezkasat skejet.
- Souques** : **triade de ~** ◇ **Souques' triad** ◇ **triadezh b. Souques** Dispuilhad e tachad Ramsay-Hunt, strafuilhoù melc'houedenn-rakkambr ha seizi trobarzhel an dremm a-zalc'h gant ur senkl eus ar gangrenn a-c'hlin.
- sous-clavière voleuse** ou **subclavière voleuse** : **syndrome de la ~** ou **sous-clavière** ou **subclavière** : **syndrome du vol de l'artère** ~ ◇ **subclavian steal syndrome** ◇ **azoniad g. stunañ (pe stunad) an dalmerenn endan-drebez** Azoniad heskwad empenn arsellet e degouezh stnoz pe dromboz an dalmerenn endan-drebez (en argrec'h talmerenn ar mellkein) oc'h erzerc'haat an distreugañ darnel, e gounid an ezel krec'h, eus lanv ar gwad en erdu an empenn. Talmerenn ar mellkein diouzh an tu tizhet a arc'hwel a-gilred : ar gwad deuet dre ar garotidenn ha talmerenn ar mellkein a-eiltu, e par liestueg Willis (kelc'h talmerennoù an empenn), zo distreuet evit azgwazhiediñ an dalmerenn endan-drebez en ardraoù ar skoilh.
- sous-costal** : **point** ~ ◇ ◇ **poent g. is-kostoù** Poent loet 2 cm a-is da ribl ar c'hostoù (amparet gant an eizhvet, navvet ha dekvet kostenn), e-kichen penn araok an dekvet kostenn, en diavaez eus ar poent bestlgellennel : pouezañ warnañ a zec'h an laur el lestrlounezhofoù hag e grouanegezh al lounezh.
- sous-crépitant** : **râle** ~ ◇ **subcrepitant rale** or **crackling rale** ◇ **ronk g. goustraklus** Trouz graet en daou lankad an analañ, oc'h erzerc'haat bezañs borc'hadoù er bronkez hag er c'horrvronkez.
- sous-maxillaire** : **glande** ~ ◇ **submandibular gland** ◇ **gwagrenn b. endan-c'haved** Gwagrenn halviñ daoudañv, loet etre tal diabarzh ar c'haved ha tal kostezel diaz an teod. Ar san degorzhañ anezhi zo ar san endan-c'haved.
- sous-maxillite** ◇ **submaxillitis** ◇ **gwagrennfo g. endan-c'haved** Tanijenn ar wagrenn endan-c'haved.
- sous-nasal** : **point** ~ ◇ **subnasal point** ◇ **poent g. is-fri** Kreiz ribl izelañ an divfron pe diaz spernenn araok ar fri.
- sous-occipito-bregmatique** : **diamètre** ~ ◇ **suboccipito-bregmatic diameter** ◇ **treuzkiz g. endan-gilpenn-bregma** Treuzkiz penn ar grouell o vont eus kenskejad etre ar c'hilpenn hag an askil betek kreiz ar bregma (feunteunig araok).
- sous-pénienne** : **fistule congénitale** ~ ◇ ◇ **fic'h g. ganedigel is-kalc'h** Kanol ezreol o kehentaat ar c'han troazh gant poent pe boent eus tal traoñ ar c'halc'h.
- sous-règne** ◇ **subkingdom** ◇ **isriezad b.** Live ar rummouriezh klasel, rummad etre ar riezad (a-us) hag ar skourrad (a-is).
- sous-unité** ◇ **subunit** ◇ **isunvez b.** Elfenn barzhiat en amparadur ur molekul, da skouer un digorvell polipeptidek.
- Southern-blot** ◇ **Southern blot** ◇ **southern-blot g.** Kalvezder imbourc'hva arveret evit dinoiñ tammadoù DNA (sl. *immuno-notransfert*).

- Southey** : **tubes de** ~ ◇ ◇ **tuellennoù** l. (b.) **Southey** Tuellennoù e metal, berr ha bihan o c'havnez, a veze ebarzhet dindan ar c'hroc'hen evit karzhañ ar gouliñv, e degouezh anazark andire. Ne vezont ket mui arveret.
- Spalding** : **signe de** ~ ◇ **Spalding's sign** ◇ **arouez Spalding** Arouez skinourel marv ar grouell : kevarlank emañ eskern kloppenn ar grouell.
- spanioménorrhée** ◇ **spanomenorrhoea** ◇ **mizuspad** g. Hiradur an entremez etre ar miziou.
- sparadrapp** ◇ **sparadrapp** ◇ **lien s. & g. peg, peglien** Bandenn lien pe baper, war un tu anezhi un danvezenn englenus a dalvez d'he arloañ war ar c'hroc'hen. A-wechoù ez eus ur gwezher enni.
- sparganose** ◇ **sparganosis** ◇ **sparganoz** g. Arvevadezh ouzh an den arsellet dreist holl e broioù ar Reter, devoudet gant diorreadur larved spesadoù 'zo eus ar genad *Diphyllobothrium* pe *Sparganum mansoni*.
- spartéine** ◇ **sparteine** ◇ **spartein** g. Alkaloid liñvel, eoulek, pistriek, douhennet eus ar balan (*Sparticum scoparium*), an delun anezhañ o vezañ C₁₅H₂₆N₂. Diounezet hepken dre ensinklañ, e rezh sulfat, evel gwilioudoger. Muiaat a ra kreñvder hag aliested argrezadoù ar grozh vec'hiek.
- spasme** ◇ **spasm** ◇ **andag** g. Argrezad andiarvenn, trumm ha trebadek, ur gigenn, ur stroll kigennoù pe un hordenn unek zoken. Amberzet e vez an termen gant aozerion 'zo da argrezad kridek ar c'higennoù levn.
- spasme carpo-pédal** ◇ **carpopedal spasm** ◇ **andag g. dorn-troad** Andag loet en daou zorn hag en daoudroad, reudet war enrakkamm, a vez arsellet e-kerz barradoù tetaniezh 'zo.
- spasme du sanglot** ◇ **reflex hypoxic crisis** ◇ **andag difronkal** Glizi ar vagadell dre isvec'h oksigen e-kerz ur gaouad konnar.
- spasme de torsion** ◇ ◇ **andag gweañ** Azoniad naouus dre fiñvoù andiarvenn liesseurt, trumm, pe koreoatetozek, devoudet gant gwagennoù argrezañ tantek, o wazhañ dreist holl kigennoù ar c'hef (gweañ gant drekwar pe treuzrakwar) ha re an izili. An andag gweañ a c'hell bezañ kentael pe darvezout da heul un empennoù pe e-kerz kleñved Wilson.
- spasmes en flexion** : **syndrome des** ~ ◇ ◇ **nodding spasm** ◇ **azoniad g. an andagoù plegadel** Azoniad kentael pe a-wechoù eilvedel da anafoù empennoù, o tarvezout e miziou kentañ ar vuhez. Kevrediñ a ra : kigenandagoù tantek berr kenan, a voleadoù, o tevoudañ plegadur ar penn hag ar pevar ezel, o tarvezout dre varradoù arreat e-pad meur a viz; un argizañ bredloc'hadel muiek ha trebadek; daskemmoù rizhek eus an empenvarwezad (*migorvez muiek*). Ent emdarzh e paouez ar resmiad dedreñ, o lezel arlenadoù bredel (divig lavarel) pe droukfellel (azoniad Lennox). Ur mezegadur kentrat dre ar c'hortikoidoù pe an ACTH a gas d'ar pare.
- spasmes fontionnels** ou **professionnels** ◇ **occupation neurosis** ◇ **andagoù arc'hwelel** pe **micherele** Strafuluilh an tant kaherel diwar arreata an hevelep fiñvoù, evel glaz ar skrivagnerion, ar biancoourion, ar c'horollerezed.
- spasmodicité** ◇ **spasmodism** ◇ **andagusted** b. Tued kreñv pe greñvoc'h da zargrezañ.
- spasmodique** ◇ **spastic** ◇ **1 andagek** aa., **dasstrizhek** aa. **2 andagel** aa. 1 O naouiñ dre andagoù. 2 A-zave d'an andagoù.
- spasmogène** ◇ **spasmogenic** ◇ **andageiat** aa. A zec'han an andag.
- spasmophilie** ◇ **spasmophilia** ◇ **spasmofiliezh** b. Usvroudadusted nervgaherel a zevoud ur raktued da varradoù andagoù flugez, ent dibarek er c'harloc'henn, pe da zargrezadoù kaherel e rezh tetaniezh. Direizhoù ionel pe migennevid ar c'halkiom, ar fosfor hag ar magnezium a vez kiriek a-wechoù. Ar c'hahervarwezañ a lak a-wel un oberiezh arreat rizhek emdarzh pe war-lerc'h desejadur ur rolt. Alies e vez yael arouez Chvostek.
- spécialiste** ◇ **specialist** ◇ **arbennigour** g. **-ion** Mezeg a embreg ent digen ur skourr savelet eus ar vezekniezh pe en deus kembelioù dibarek ennañ. A-c'houde Genver 2004 ez eo deuet ar vezekniezh hollek da vezañ un arbennigiezh e Frañs.
- spécialité** ◇ **speciality** ◇ **arbennigiezh** b. Diskiblezh angemeret gant Urzh ar Vezeion o c'hoarvezout, en tu all d'ar stummadur mezegel hollek, eus ur gouziadur dibarek en ur skourr savelet eus ar vezekniezh. Goude bezañ perzheget, e c'hell ar mezeg embreg e arbennigiezh.
- spécialité pharmaceutique** ◇ **patent medecine** ◇ **brientaozad** g. Nep lia rakprientet, arbaret ent dibarek ha dezhañ un deavad piaouel (merk pe anvad marilhet).
- spécificité** ◇ **specificity** ◇ **1 spesadegezh** b. **2 spesadelezh** b. 1 Hollad an doarenoù piaouel d'ur spesad. 2 An devoud ez eo spesadel perzh un anadenn, un elfenn, ent arbennik al lontegezh etre un antikorff hag an antigen keñverek.
- spécifique** ◇ **specific** ◇ **1 spesadek** aa. **2 spesadel** aa. 1 Naouus d'ur spesad savelet mat. 2 A-zave d'ur spesad savelet mat pe a-zave da berzhioù piaouel un anadenn, un elfenn, o lakaat kemm etrezi hag an holl re all nes dezhi pe a denn dezhi, ent arbennik en hangaeoniezh a-zave d'al lontegezh oc'h eren un antikorff hag an antigen keñverek.
- SPECT** ◇ **Single Photon Emmision Computed Tomography** ◇ **SPECT** Haenluniñ, skingannluniñ niverel dre ec'hodiñ foton γ. E brezhoneg e c'haller ivez ober gant SNEG : *Skingannluniñ Niverel dre Ec'hodiñ foton Gamma*.
- spectre** ◇ **spectrum** ◇ **skalfad** g. Ster kentañ an termen zo ar skeudenn roet gant ar gouloù gwenn, digenaozet dre dremen a-dreuz d'ur prism en e gedrannoù elfennel unliv. Dre astenn ster ez eo disoc'h ledadur ha digenaozadur nep skinad tredanwarellel pe rannigel en e gedrannoù, a-gevreizh d'ur braster naouus (trohed, talm, gremm fiñvek). Anv a reer ivez a *skalfad stenioù*. E-maez tachenn ar skinoù hag ar stenioù e talvez kement ha teskad doareoù ketep ur gwezher (bevastaleroù, da skouer), teskad derezioù grevusted ur c'hleñved, h.a.

- spectrine** ◇ **spectrin** ◇ **spektrin** g. Protein kelligatel koc'henn an hemati.
- spectrographie** ◇ **spectrography** ◇ **skalfadluniñ, skalfadlunerezh** g. Teskad an hentennoù o kevaraezañ dewerc'hañ ha lerc'hwezañ ar skalfadoù diseurt, war-benn ren un elfennerezh eeun pe studiañ staladur an atomennoù en ur volekulenn.
- spectrométrie** ◇ **spectrometry** ◇ **1 skalfadouriezh** b. **2 skalfadventerezh** g. An termen kentañ a ra dave d'ar c'halvezderioù o kevaraezañ elfennerezh ar sknadoù en un doare doareadel ar peurliesañ. Mui ouzh mui e tenn an disoc'hoù da vezañ kementadel ha kevasoc'h eo neuze an eil termen.
- spectroscopie** ◇ **spectroscopy** ◇ **skalfadsellerezh** g. Elfennerezh ar c'horfoù dre imbourc'h selledel o skalfadoù lugañ pe ec'hodiñ danzeet diwar-bouez ur skalfadseller.
- spéculaire** ◇ **specular** ◇ **a-zrec'h** aa. (sl. *écriture en miroir, écriture spéculaire* ha *parole en miroir*).
- spéculum** ◇ **speculum** ◇ **spekulom** g. Ardivink amkanet da ledanaat ur gavenn naturel (gouin, youlc'h, h.a.) war-benn aesaat an imbourc'h anezhi ha, diouzh an dro, ebarzhiñ ur benveg enni.
- spédatrophie** ◇ **dazisteñv** g. Anez naouus dre un isteñv strewek o tizhout an amwiskadoù, ar gwiad kellaouek endan-groc'hen, ar c'higennoù, an eskern; dasparzhet eo en un doare direoliek, met en ervez emañ da wazhañ ur rann ezel en he fezh. Kevret ganti e vez a-wechoù un isteñv a r' gwagrennoù (bronnoù) hag ul ledanteñv a n dremm.
- spermagglutinine** ◇ **spermagglutinin** ◇ **speragglutinin** g. Antikorf en araez da zazgludañ ar spergelligoù.
- spermatide** ◇ **spermatid** ◇ **spermatid** g. Kellig o tisoc'h eus rannadur ar spermatokit a eil urzh hag a c'hano ar spergellig.
- spermatique** ◇ **spermatic** ◇ **˜sper, ˜ar sper, sper-** A-zave d'ar sper.
- spermatocèle** ◇ **spermatocèle** ◇ **spervozhell** b. Koeñvadur furmet gant hogennadur sper er c'hledennoù pe en argell.
- spermatocystectomie** ◇ **spermatocystectomy** ◇ **ezvenañ ar c'hellennoù sper, spergellennezvenañ** b. Dazbidañ ar c'hellennoù sper.
- spermatocystite** ◇ **spermatocystitis** ◇ **spergellennfo** g. Tanijenn ar gellenn sper.
- spermatocyte** ◇ **spermatocyte** ◇ **spermatokitenn** b. **-où, spermatokit** s. Bongellig revel c'houevel o tisoc'h eus treuz-furmadur ur spermatogonienn.
- spermatogenèse** ◇ **spermatogenesis** ◇ **sperbarañ** Paridigezh spergelligoù, lies lankad ouzh he ober. Ar spermatogoni, kelligoù tuellenn spergaser ar glidenn, a zec'han ar spermatokit a gentañ urzh, diploidel, ha dre ur meioz e tedaolont ar spermatokit a eil urzh, haploidel. An daou lankad-se a ampar ar *spermatokitparañ*. En un trede lankad, ar spermatokit a eil urzh a emdrez-furm e spermatidoù, diaraogerioù ar spergelligoù. Ar *spermatidparañ* eo. Ar c'helligoù-se a gendalc'h d'emdrezfurmiñ e rezh *spergelligoù*, hep emrannañ (furmadur ur penn kabet gant un akrozom hag ur skourjezig), lankad anvet *spergelligparañ*. Da heul e tilaok kelligoù Sertoli pep spergellig en oaled an duellenn spergaser, lankad diwezhañ anvet *spergelligrezañ*.
- spermatogonie** ◇ **spermatogonium** l. : **spermatogonia** ◇ **spermatogonienn** b. **-où, spermatogoni** s. Bongellig revel c'houevel deraouel ganet en un duellenn spergaser o tec'hanañ ar spermakit a gentañ urzh.
- spermatorrhée** ◇ **spermatorrhoea** ◇ **sperverañ, sperveradenn** b. Beradur sper andiarvenn.
- spermatozoïde** ◇ **spermatozoon** ◇ **spergellig** b. Kellig revel gouevel (gamet gourev), dezhi etre 10 ha 60 µm hed, heloc'h, elfenn vonel ar sper, en araez da frouezhigiñ ar vigellig. C'hoarvezout a ra ar spergellig eus ur penn, ennañ ar graoñell, eus ul lodenn etreat, eus ul lost hag eus ul lodenn dibenn.
- spermaturie** ◇ **spermaturia** ◇ **troazhsperegezh** b. Bezañs sper en troazh.
- sperme** ◇ **sperm** ◇ **sper** g. Liñvenn arwenn, tev, dezhi ur c'hwezh dezverkus, strinset e koulz an derod. Amparet eo gant borc'hadoù ar gwagrennoù ganadel gouevel ketep (klidennoù, argell, kellennoù sper, raksavenn, gwagrennoù ognonenn-kantroazh) hag emañ ar spergelligoù en arlug enni.
- spermicide** ◇ **spermicide** ◇ **1 ˜sperlazhañ, sperlazer** aa. **2 sperlazer** g. **-ioù** 1 A-zivout un aozad en araez da zistrujañ ar spergelligoù. 2 Aozad sperlazhañ.
- spermiogenèse** ◇ **spermiogenesis** ◇ **spergelligparañ** Lankad diwezhañ ar sperbarañ, eleze treuzfurmadur ar spermatidoù e spergelligoù.
- spermiologie** ◇ **spermatology** ◇ **speroniezh** b. Studi ar sper.
- spermoculture** ◇ **spermoculture** ◇ **sperdiñvañ** Hadennañ ur metoù tiñvañ gant sper e sell d'un imbourc'h garvevionel.
- spermocytogramme** ◇ **spermocytogram** ◇ **spergelligrestrad** g. Disoc'h studi neuziadurel ar spergelligoù. Un elfenn eus ar sperrestrad eo.
- spermogramme** ◇ **spermogram** ◇ **sperrestrad** g. Disoc'h an imbourc'h klok a r' sper : eriñvañ ar spergelligoù, studi ar furm, an heloc'hded anezho. Kevaraezañ a ra andalañ ar frouezhusted c'houevel.
- spermolithe** ◇ **spermolith** ◇ **spervaen** g. Fetisaenn furmet er forzhioù sper.
- sphénocaverneux** : **syndromes** ~ ◇ **azoniadoù** l. (g.) **genneg-keviaouek** Azoniadoù speur diavaez ar god keviaoek ha skarr krec'h ar pod lagad, naouus dre dizhad nervennoù loc'hañ al lagad ha nervern al lagad war an treug anezho er c'hloppenn, devoudet gant un daraez, ur poread (amaskornennfo ha kevnidegenennfo pergen), ur yoc'henn (meningiom askell vihan ar genneg) pe un darvoll karotidel.

- sphénocéphale** ◇ **sphenocephalus** ◇ **gennbenneg** g. -eion Krouell euzhek dezhañ ur penn e stumm ur genn e rannbarzh ar bregma, diwar ur c'henaskornad rakkoulz eus ar feunteunigoù adreñv.
- sphénocéphalie** ◇ **sphenocephaly** ◇ **gennbennegezh** b. Kammneuziad ar c'hloppenn naouus dre un neuz tric'hornek gant ur beg adreñv; ur seurtad kloppennisvoll eo, gin an dric'hornbennegezh.
- sphénoïde** ◇ **sphenoid** ◇ **genneg** g. Askorn undañvat ha kemparzhek eus parzh krenn ha traoñ ar c'hloppenn.
- sphénoïdite** ◇ **sphenoiditis** ◇ **gennegfo** g. Tanijenn glaourgenn kev ar genneg.
- sphérocytes** ◇ **spherocytes** ◇ **sferokit** s. Eritrokit dezho stumm ur gantenn daouargeinek (e-lec'h bezañ daouargevek), gant un tevder brasoc'h hag un treuzkiz bihanoc'h. Reol e chom an ec'honad anezho. Arsellet e vezont er mikrosferokitoz hêrezhel, hogen ivez en amwadoù gwadloezadel 'zo all.
- sphérocytose** ◇ **spherocytosis** ◇ **sferokitoz** g. Furm amwad loezadel naouus dre vezañs sferokit er gwad.
- sphérophakie** ◇ **spherophakia** ◇ **sferofakiezh** b. Kammneuziadur pellennek ar ferenn.
- sphéropaste** ◇ **spheroplast** ◇ **sferoplast** g. Seurtad protoplast nad eo ar speurenn anezhañ peurgollet (outi ez eus rann lipoproteek pe lipopolisakarek a bad). Ned eo ket ken bresk hag ar protoplast, hag emañ en ervez da adamparañ e speurenn ha da neriñ. Hevelebet eo gant aozerion 'zo ouzh ar *furmoù* L.
- sphincter** ◇ **sphincter** ◇ **kelc'hstrishaer** g. -ioù Kigenn e stumm ur walenn en dro d'un igorenn o talvezout d'he digeriñ pe d'he serriñ.
- sphinctéralgie** ◇ **sphincteralgia** ◇ **kelc'hstrishaerost** b. Laur e par ur c'helc'hstrishaer, hini ar fraezh pergen.
- sphinctérectomie** ◇ **sphincterectomy** ◇ **kelc'hstrishaerezvenañ** Dazbidañ ur c'helc'hstrishaer.
- sphinctérométrie** ◇ **sphincterometry** ◇ **kelc'hstrishaerventañ** Muzulierezh tant kaherel ur c'helc'hstrishaer.
- sphinctéroméetrogramme** ◇ **kelc'hstrishaerventwezad** g., **sfinkterometrogramm** g. Kevregad o terc'hennañ disoc'hou ar kelc'hstrishaerventañ.
- sphinctéroplastie** ◇ **sphincteroplasty** ◇ **kelc'hstrishaeratelviñ** Gwezh surjanel da ratreañ ur c'helc'hstrishaer.
- sphinctéropasme** ◇ **sphincterospasm** ◇ **kelc'hstrishaerandag** g. Andag ur c'helc'hstrishaer.
- sphinctérotomie** ◇ **sphincterotomy** ◇ **kelc'hstrishaerenbenañ** Skejañ surjanel ur c'helc'hstrishaer.
- sphingolipidose** ◇ **sphingolipidosis** ◇ **sfingolipidoz** g. Kleñved naouus dre hogennadur sfingolipidoù e gwiadoù hag organoù diseurt a-zalc'h gant ur strafuilh enzimatek e kennevid an danvezennou-se.
- sphygmique** ◇ **sphygmic** ◇ **poulzadel** aa. A-zave d'ar poulz.
- sphygmogramme** ◇ **sphygmogram** ◇ **talmdresenn** b., **poulzwezad** g. Tresenn disoc'h ar sfigmografiñ.
- sphygmographe** ◇ **sphygmograph** ◇ **sfigmograf** g. Ardivink amkanet da lerc'hwezañ ar poulzadennoù talmerel ouzh o amplaet.
- sphygmographie** ◇ **sphygmography** ◇ **sfigmografiñ**, **poulzwezañ** Lerc'hwezañ ar poulzadennoù talmerel diwar-bouez ar sfigmograf.
- sphygmologie** ◇ **sphygmology** ◇ **poulzoniezh** b. Hollad an anaoudegezhioù a-zivout ar poulz, pouezus kenan er vezekniezh sinaat hengounel.
- sphygmomanomètre** ◇ **sphygmomanometer** ◇ **talmerwaskventer** g. Ardivink amparet gant ur brec'hgenn hevolc'h hag ur gwaskventer, amkanet da vuzuliañ ar gwask talmerel.
- sphygmomanométrie** ◇ **sphygmomanometry** ◇ **talmerwaskventañ** Muzuliañ ar gwask talmerel.
- spica** ◇ **spica** ◇ **spika** g. Anroad kroazigellek (kroazanroad) arloet ouzh gwrizienn un ezel ha stabiliet dre un dro e par ar skoaz pe ar varlenn a-eiltu.
- spicule** ◇ **spicule** ◇ **spikul** g. Nep luniadur korfadurel e stumm ur pik pe un nadoz.
- Spiegel** : **hernie de la ligne semi-lunaire de ~** ◇ **Spiegel's hernia**, **Spiegelian hernia** ◇ **avelenn** b. **al linenn gornloarek** Avelenn sezet e-par linenn unaniñ ar gigenn dreuz hag ar faskienn anezhi (al linenn gornloarek).
- Spielemeyer-Vogt** : **maladie de ~** ◇ **Spielemeyer-Vogt disease** ◇ **kleñved** g. **Spielemeyer-Vogt** Furm yaouerel an diodezh steuzwelel familhel feudek kent 20 vloaz.
- Spiller** : **type ~** ◇ **rizh** g. **Spiller** Seurtad kahernaoued kentael argammedek gant usvent kaherel gwir.
- spin** : **écho de ~** ◇ **spin echo** ◇ **advant** g. **spin** Rizh kemalenn arveret er skeudennerezh dre zasson gwarellec. Arverañ a ra adarunkoulzadur ar spinoù dre ur skog nevez eus ar gwarellvaez lusket war-lerc'h steuz hañvalat an arhent deroù.
- spina bifida** ◇ **spina bifida** ◇ **spina bifida** g. (sl. *myélodysraphie*, *hydrorachis*, *spina bifida*).
- spina ventosa** ◇ **spina ventosa** ◇ **spina ventosa** g. Torzhellegezh an eskern sezet ent dibarek e par an oensoù, an askorn o kaout enno un neuz gloevennek, evel pa vije leun a aer.
- spinal** ◇ **spinal** ◇ **livenn**; -livenn; a-livenn; livennel aa. A-zave d'al livenn gein pe d'ar mel a-livenn.

spinale postérieure : **syndrome de l'artère** ~ ◇ **posterior spinal artery syndrome** ◇ **azoniad g. talmerenn adreñv al livenn** Azoniad dibaot a heskwad a 'r mel (arzalet ar bezoud anezhañ) devoudet gant anforzh talmerenn adreñv al livenn. Ur boukadur sezet er pañsoù adreñv a zevoud kammeraeziou ha strafuilhoù an don- hag ar stokeraezien en tachad danlec'hiet d'an anaf. Un tizhad kevret eus kornioù adreñv ar mel a ouzhpenn en o ziriadoù un aneraez hollek ha bevennek ha steuz an damougoù a-stirenn hag an damougoù kroc'hen. An heskwad a ya alies betek ar pañsoù kostezel adreñv, o tec'han un divig loc'hadel en tachad endananafel.

spinalgie ◇ **spinalgia** ◇ **mellennost b.** Laur ouzh ar pouezañ en ur vellenn.

spinocellulaire ◇ **spinocellular** ◇ **gourc'henngelligel aa.** A-zave da gelligoù gwelead Malpighi ar c'hroc'hen hag ar glaurgennoù, kelligoù ereet dre bontoù pe spernennoù.

spino-trochantérienne : **ligne** ~ ◇ **Schœmaker's line** ◇ **linenn b. Schœmaker** Linenn eeun treset eus beg an trovaleg bras d'ar begel, o tremen dre ar spernenn glun araok uhelañ. Talvezout a ra da spislec'h evit andalañ dilec'hiadoù an trovaleg bras e torroù ha disvelladoù al lez.

spinosisme ◇ **kornspernegezh b.** Hiperkeratoz kroc'hen, naouus dre astennadurioù kornek, dezho un nebeut milimetrou hed, o sankañ e-barzh ar bolc'henoù blev. Anvet eo ivez *keratoz bolc'hennek kernennek*.

spiramycine ◇ **spiramycin** ◇ **spiramikin g.** Bevastaler eus kerentiad ar makrolideier dezho ur gwered bakteriharz, gounezet dre diñvañ *Streptomyces ambofaciens*. Nes kenan d'an eritromikin, ar spiramikin a vez diounezet dre euvriñ.

spirème ◇ **spireme** ◇ **spirem g.** Neuz neudheñvel ar c'hromozomou e-doug ar profaz.

Spirillaceae ◇ **Spirillaceae** ◇ **Spirillaceae** Kerentiad bakteri argromm pe droellennek, ennañ tri genad : *Spirillum*, *Helicobacter* ha *Campylobacter*.

spirilles ◇ **spirilla** ◇ **spirill s.** Garvevion eus ar genad *Spirillum*, dezho stumm edañvennoù hirvoan ha kilwedennek.

spirillose ◇ **spirillosis** ◇ **spirilloz g.** Nep pore devoudet gant spirill, ent dibarek gant evned porzh, kleñved diwar *Spirillum gallinarum* ha treuzkaset gant amprevaned eus ar genad *Argas*, ha gant an den, an derzhienn dre vrazhad ar razhed (sodokou) devoudet gant *Spirillum minus*.

Spirillum ◇ **Spirillum** ◇ **Spirillum** Genad bakteri eus kerentiad ar *Spirillaceae*, a zo kleñvedus spesadoù 'zo anezho.

Spirochaeta ◇ **Spirochaeta** ◇ **Spirochaeta** Genad bakteri eus kerentiad ar *Spirochaetaceae*, troellennek, gweüs (spiroket), eus 6 da 500 µm hed hag eus 0,2 da 0,75 µm treuzkiz, o trigañ rez en dourioù chag, dous pe sall.

Spirochaetaceae ◇ **Spirochaetaceae** ◇ **Spirochaetaceae** Kerentiad bakteri eus urzhad ar *Spirochaetales*, ennañ bakteri moan kenan (0,1-0,5 µm) ha hir kenan ar peurliesañ (betek 500 µm), kempunet e troellennoù. Heloc'h ez int bennozh da skourjezigoù periplasmel (gwianoù ahelel), aervevat pe aerat anret. Kleñvedus eo spesadoù 'zo. C'hoarvezout a ra ar c'herentiad-se eus ar genadoù *spirochaeta*, *treponema*, *borrelia* ha *leptospira*.

spirochètes ◇ **spirochete** ◇ **spiroket s.** Garvevion gougevret ouzh ar genad *spirochaeta*.

spirochètogène ◇ **spirochetogenous** ◇ **spiroketeiat aa.** Devoudet gant spiroket.

spirochètose ◇ **spirochaetosis** ◇ **spiroketoz g.** Nep anaez devoudet gant spiroket, reoù 'zo o vezañ kleñvedoù micherel (taolenn n° 19).

spirochètose bronchopulmonaire ◇ **bronchospirochaetosis** ◇ **spiroketoz g. bronkez-skevent** Bronkezfo gwadskopadel diwar *spirochaeta Castellani*. Dizoloet da gentañ e Sri Lanka ez eo bet adkavet da c'houde e pep lec'h er bed hag er vro-mañ ivez.

spirogramme ◇ **spirogram** ◇ **gwentwevad g.** Tresenn disoc'h ar gwentwezañ.

spirographe ◇ **spirograph** ◇ **gwentwezer g., spirograf g.** Ardivink arveret da wentwezañ.

spirographie ◇ **spirography** ◇ **gwentwezañ** Lerc'hwezañ ar fiñvoù hag an ec'honadoù analadel diwar-bouez ur gwentwezer.

spiro lactone ◇ **spiro lactone** ◇ **spiro lakton g. -où** Steroid kevanaozel, evel ar *spironolakton*.

spiro mètre ◇ **spiro meter** ◇ **analventer g. -ioù, spiro metr g.** Ardivink arveret en analventañ.

spiro métrie ◇ **spiro metry** ◇ **analventañ** Muzuliañ ec'honadoù ar skevent diwar-bouez un analventer.

spironolactone ◇ **spironolactone** ◇ **spironolakton g.** Troazhusvorc'her gourzhaler d'an aldosteron e par tuellenn al lounezh. Devoudañ a ra ur muiaour eus an natriomdroazhvorc'h hag ul leiaour eus ar c'haliomdroazhvorc'h. A se an anv a troazhusvorc'her "erbeder kaliom" hag arveret e vez alies kevredet gant an troazhusvorc'herioù tiazidek.

spiroscopie ◇ **spiroscopy** ◇ **spiroskopiezh b.** Imbourc'h an analañ dre vuzuliañ ec'honad an aer ec'hanalet diwar-bouez ur spirooskop, arveret dreist holl en embregoù analadel gant an arbareaed anaezioù bruskel.

Spitz : **nævus de** ~ ◇ **Spitz's nevus** ◇ **nevuz g. Spitz** Yoc'hennig kroc'hen kuñv a orin melanokitel, arront, roz pe ruz, fetis hag anlaur, a zedro gorrek ha kuñv, o tarvezout gant ur gouzrec'h yaouank.

splanchnectomie ou **splanchnicectomie** ◇ **splanchnicectomy** ◇ **splanknegezenañ** Dazbidañ un nervenn splanknek.

splanchnique ◇ **splanchnic** ◇ **splanknek aa. ; a-flugez** A-zave d'ar flugez. — An *nervennoù splanknek*, elfennoù ar reizhiad simpatek, o deus perzh en arouleviañ arc'hwel flugez ar c'hef.

- splanchnocrâne** ◇ **splanchnocranium** ◇ **dremmglok** g. Atel rizhellel an dremm. Lodenn izelañ ar migordiaz eo, amparet gant ar gwaregoù brenkel a zo en dro da gavenn ar c'hargadenn.
- splanchnodyme** ◇ ◇ **splanknodim** g. Euzheg naouus dre zizoubladur un nebeut organoù (kolon, kourzh, gouin, h.a.).
- splanchnographie** ◇ **splanchnography** ◇ **flugezluniñ** Skinluniñ ar flugez goude bezañ ensinklet er wazhiadurezh un danvezenn demer ouzh ar skinoù X.
- splanchnologie** ◇ **splanchnology** ◇ **flugezadurezh** b. Rann ar gorfadurezh o plediñ gant ar flugez.
- splanchnomicrie** ◇ **splanchnomicria** ◇ **korfflugezegezh** b. Leiadur ec'honad an holl flugez, arsellet en disnaon, e kleñved Simmonds hag en holl stadoù a zisvezhur.
- splanchnopleure** ◇ **splanchnopleura** ◇ **splanknopleur** g., **splanknoderm** g. Er rizhell, feilhenn a-flugez ar mezoderm, a-stok ouzh an endoderm, o tiforc'hañ diouzh ar somatopleur (ar feilhenn diavaez, a-speur). Etre an div feilhenn emañ an tachad krezenn-ampelenn pe kelom. Ar splanknopleur a yelo da amparañ feilhenn a-flugez an amgalonenn, ar grezenn a-skevent hag an ampelell a-flugez.
- splanchnotomie** ou **splanchnicotomie** ◇ **splanchnotomy** ◇ **flugezenbenañ** Skejañ un nervenn splanknek.
- splanchnotrope** ◇ **viscerotropic** ◇ **flugezkerc'h** aa. A-zivout an danvezennoù kimiek, ar bakteri, ar viruz o lenañ ent hanbarek ouzh ar flugez.
- splénalgie** ◇ **splénalgie** ◇ **felc'host** b. Laur e par ar felc'h.
- splénectomie** ◇ **splenectomy** ◇ **felc'hezvenañ** Dazbidañ darnel pe hollel ar felc'h.
- splénique** ◇ **splenic** ◇ **felc'hel** aa., **-felc'h** A-zave d'ar felc'h.
- splénisation** ◇ **splenization** ◇ **felc'hvanekaat** Treuzfurmadur o c'hoarvezout gant parenkim ar skevent e-doug ur skeventad lemm, naouus dre un neuz heñvel ouzh hini gwriad ar felc'h, e dalc'h un darwazh skevent pe un douesadur.
- splénite** ◇ **splenitis** ◇ **felc'hfo** g. Tanijenn ar felc'h.
- splénocardiaque** : **syndrome** ~ ◇ ◇ **azoniad** g. **felc'h-kalon** Azoniad o kevrediñ ezreolderioù ar felc'h (ezvezañs pe, er c'hontrol, liesel) ha kammneuziadoù kalon.
- splénocontraction** ◇ **splenocontraction** ◇ **felc'hargrezañ** Argrezañ ar felc'h devoudet gant araezioù kimiek (kinin, adrenalin, strikinin, h.a.) pe fizikel (redoù tredan, fiñv, broudañ an nervenn splanknek, diwadañ, h.a.), pe gant ar from zoken. An argrezañ adrenalinek zo bet arveret er c'hlinik evit andalañ direadusted ur felc'husvent hag evit gwellaat un imbourc'h gwad (gwaderiñvañ ha gwadrestrad).
- splénocytes** ◇ **splenoocytes** ◇ **splenokit** s. Kelligoù mononuklear ha makrofag sezet e god ar felc'h.
- splénogène** ◇ **splénogenic** ◇ **felc'hien** aa. O tont eus ar felc'h.
- splénogramme** ◇ **splenogram** ◇ **felc'hrestrad** g. Disoc'h studi kelligourel doareadel ha kementadel un erlamad, embreget dre ezwanañ ar felc'h.
- splénomanométrie** ◇ **splénomanometry** ◇ **felc'hgwaskventerezh** g. Muzulierezh ar gwask gwazhiennel porzh dre ezwanañ ar felc'h, par da 10 cm dour ent reol.
- splénome** ◇ **splénoma** ◇ **splénom** g. Nep yoc'henn ar felc'h.
- splénomégalie** ◇ **splénomegaly** ◇ **felc'husvent** g. Kresk ec'honad ar felc'h.
- splénomégalie égyptienne** ◇ **egyptian splénomegaly** ◇ **felc'husvent egiptat** Rouestlad grevus kenan ar bilarzioz gant *Schistosoma mansoni*, o tedreiñ evel ur c'hleñved Banti e tri lankad : usvent felc'h, kirroz an avu ha torliñv dibenn.
- splénomégalie myéloïde** ◇ **idiopathic myelofibrosis** ◇ **felc'husvent mieloidel** Azoniad melneradel henek gant trewe mieloidel ar felc'h, a dizh un ec'honad bras kenan, hag eskernvelfibroz gant amwad hag elwenn; dedreiñ a ra etrezek ar marv en un nebeut bloavezhioù dre wadliñv pe amwad.
- splénomégalie primitive** ◇ ◇ **felc'husvent kentael** Anaerz naouus dre neridigezh gwriad limfoidel ar felc'h : furm a *limfadenomatoz anleukemek*.
- splénopathie** ◇ **splenopathy** ◇ **felc'hanaez** g. Anvad genadel ar c'hlañvadurioù felc'h.
- splénophlébite** ◇ ◇ **felc'hgwazhiennfo** g. Gwazhiennfo gwazhienn ar felc'h, o tevoudañ ar splénotromboz hag an dianlenadoù anezhañ.
- splénoportographie** ◇ **splénoportography** ◇ **felc'hporzhluniñ** Skinluniñ ar reizhiad porzh ha gwazhienn ar felc'h, goude ensinkludur un aozad dargemm demeraat dre ezwanañ treuzspeurel parenkim ar felc'h.
- splénosclérose** ◇ **splénosclerosis** ◇ **splénoskleroz** g. Argerzh stirekaat ar felc'h, ar peurliesañ a-gevret gant usvent.
- splénose péritonéale** ◇ **splénosis** ◇ **splénos** g. **ampelennel** Bezañs nozelennoù gwriad felc'hel e kavenn an ampelell, da heul ur felc'hezvenañ evit ur freg daraezel eus ar felc'h.
- splénothrombose** ◇ ◇ **splénotromboz** g. Tromboz gwazhienn ar felc'h, alies e dianlen tromboflebit ar reizhiad porzh.

- spondylarthritis** ◇ **spondylarthrititis** ◇ **mellennarzfo** g. Arzfo an arzoù etre-melloù. — *m. tromaothus* : remm foel henek o tizhout an arzoù kroazell-klun hag al livenn gein, arsellet dreist holl gant ar gourev yaouank, kevret alies gant an antigen HLA B 27.
- spondylarthropathie** ◇ **spondylarthropathy** ◇ **mellennarzad** g. Nep anaez o tizhout arzoù ar mellkein.
- spondylarthrose** ◇ **spondylarthrosis** ◇ **mellennartroz** g. Artroz al livenn gein.
- spondylite** ◇ **spondylitis** ◇ **mellenno** g. Tanijenn, a orin poreel ar peurliesañ, ur c'horf mellenn, kevredet peurvuiañ gant hini an disk etre-melloù dreist-pe danlec'hiet. Lies mellenn ha lies disk a c'hell bezañ tizhet en ur ser.
- spondylizème** ◇ **spondylizema** ◇ **spondilizem** g. Choukadur al livenn gein da heul distruj un pe lies mellenn.
- spondylocléisis** ou **spondylokllisis** ◇ ◇ **spondilokliziz** g. Seurtad spondilolisteziz ma stou korf ar vellenn war zigor krec'h al lestr hep mont en tu all da ribl al lestr.
- spondylocite** ◇ **spondylocititis** ◇ **mellenndiskfo** g. Tanijenn gevret ur vellenn hag an diskoù etre-melloù dreist-pe danlec'hiet.
- spondylocopathie** ◇ ◇ **mellenndiskanaez** g. Anvad genadel ar c'hlañvadurioù gant un tizhad eus ar vellenn hag eus an disk etre-melloù.
- spondylosthésis** ◇ **spondylosthesis** ◇ **mellennlinkañ** Rikladur war raok ur vellenn war unan all, en ervez da c'hoarvezout en holl rannbarzhioù eus al livenn gein, hogen ar peurliesañ etre ar mellennoù L4 hag L5 hag L5 S1.
- spondylyse** ◇ **spondylysis** ◇ **mellennloezañ**, **mellennloez** g. Odead ganedigel pe arzeuat er strizh etre an daou valed kenvellañ eus gwareg adreñv ar vellenn (*pars interarticularis*), kenttuus d'ar mellennlinkañ.
- spondylopathie** ◇ **spondylopathy** ◇ **livennanaez** g. Anv genadel nep anaez al livenn gein.
- spondyloptose** ◇ **spondyloptosis** ◇ **livennislink** g. Seurtad a vellennlinkañ kreñv kenan, al livenn gein o kouezhañ e kavenn al lestr.
- spongioblastome** ◇ **spongioblastoma** ◇ **spongioblastom** g. Yoc'henn yud amparet gant spongioblastoù, seurtad gliom leteñvel ouzh ar glioblastom.
- spongiocytes** ◇ **spongiocytes** ◇ **spongiokit** s. Kelligoù an haenad spoueek eus tachad hordennaouek ar gaenuslouezhenn.
- spongoïde** ou **spongioïde** ◇ **spongioid** ◇ **spouevanek** aa. Damheñvel ouzh luniadur logigaouek ar spoue. Termen nes : *spoueek* (Gl. *spongieux*) arveret evit al luniadoù bonan pergen, tra ma vez graet gant *spouevanek* evit ar re anvonan.
- sporadique** ◇ **sporadic** ◇ **skignek** aa. A-zivout ar c'hleñvedoù dibaot kaer, o tizhout un nebeut hiniennoù a-zistroll, a-gevenep da *darreuziat* ha da *broreuziat*.
- spores** ◇ **spores** ◇ **spor** s. Elfennoù genel lies spesad struzhel (kuzhhadeged) hag ar bakteri (protozoed sporozeod).
- sporo-agglutination** ◇ **sporoagglutination** ◇ **sporazagludañ** Dedalvezadur anadenn an dazgludañ da zeznaou ar sporotrikoz.
- sporocyste** ◇ **sporocyst** ◇ **sporokist** g. Pazenn emdrogor arvevad ar baludegezh o c'henel ar sporozeit.
- sporogène** ◇ **sporogenic** ◇ **sporbarus** aa. O c'henel spor.
- sporogonie** ou **sporogonique** : **cycle** ~ ◇ **sporogony** ◇ **sporogoniezh** b. pe **kor** g. **sporogonek** Lankad gouennañ revel ar sporozeod. A-gevenep d'ar sporogoniezh emañ ar *skizogoniezh* pe *kor skizogonek* (sl. *schizogonie*).
- sporotrichose** ◇ **sporotrichosis** ◇ **sporotrikoz** g. Mikoz devoudet gant *sporotrichum schenkii*. Deraouiñ a ra gant ul livant enkoriñ, e dianlen ur gouli kroc'hen, ha da heul e tinod nozelennoù a-hed al limfforzhoù, en ervez da c'houliezañ e rezh anafoù gomek. Dibaot kenan eo furmoù flugezel, askornel ha glaourgennel eus ar c'hleñved.
- sporozaire** ◇ **sporozeon** ◇ **sporozeenn** b. **-zoed** Kevrennad protozoed arvevat o trigañ kelligoù pe wiadoù loenel, amparet gant un dolzenn brotoplasm enni ur graoñell ha gronnet gant ur c'hennan. Gougevret ouzh ar gevrennad ez eus un niver bennak a arvevaded ouzh an den : hematozoenn ar baludegezh, kokidi 'zo, h.a.
- sporozeite** ◇ **sporozeite** ◇ **sporozeit** g. Unan eus furmoù diorreadur arvevad ar baludegezh, disoc'h ar sporogoniezh. Tremena ra ar sporozeit eus ar moustik d'an den e-pad ar flemmad.
- sporozeose** ◇ **sporozeosis** ◇ **sporozeoz** g. Nep kleñved devoudet gant ar sporozeod.
- sporulation** ◇ **sporulation** ◇ **sporañ** Furmiñ ha dilaoskiñ spor.
- sporulé** ◇ **sporulated** ◇ **sporek** aa. A-zivout ur vakterienn en araez da sporañ.
- spotting** ◇ **spotting** ◇ **gouinvouswadañ** Diwadad gouinel skañv.
- spring-thérapie** ◇ **spring-therapy** ◇ **gwinterellgurañ** Arver gwinterelloù pe bandennoù dastennek evit addiorren ar c'hig-ennoù.
- sprue nostras** ◇ **non tropical sprue** ◇ **spru** g. **nostras** Anaez leteñvel ouzh ar *spru trovanel* o tarvezout en toleadoù kerreizh, kuit a nep beaj er broioù tomm, dianav e ardarzh. Evit aozerion 'zo ez eo heñvelster gant *kleñved Gee* pe *kleñved torel* (sl. an termenou-se).
- sprue** ou **sprue tropicale** ◇ **tropical sprue** ◇ **spru** g. **trovanal** Darc'hoal gant druzoul o tarvezout er broioù tomm ha gleb, o teraouiñ trumm hag o tedeññ a-frapadoù war ur goueled henegezh; alies e vez kevret gantañ un treutadur, un isteñv kaherel muiek,

ur genaoufo gloevennek hag aftus tuet da c'houlieziañ hag un amwad uslivel. War a hañval ez eo devoudet gant ur poread diwar hadennoù anspesadel, kentoc'h eget gant un arvevadegezh pe gant negeziou vitaminoù, meneget a-wechoù. Ouzhpennomp ivez ar *spru surjiane*l, druzoul dianlenat d'un dazbid surjiane ledek eus ar vouzellenn voan.

Spumavirus ◇ *Spumavirus* ◇ *Spumavirus* Genad viruzoù (anvet evel-se en arbenn eus neuz spoumek ar c'helligoù poreet ganto) gougevret ouzh kerentiad ar *Retroviridae*. Ar Spumavirus n'int kevredet gant kleñved denel ebet anavezet bremañ.

spume ◇ *foam* ◇ *spoum* g. Liñvenn vevel goloet gant eon klogorennoù bras, evel dour soavon.

spumeux ◇ *spumous* ◇ *spoumek* aa., *eonek* aa. Gant neuz ar spoum, an eon.

squame ◇ *squama* ◇ *gourc'hennañ*, *gourc'henn* g., *gourc'hennad* g. Lavrig ezkroc'hen furmet war c'horre ar c'hroc'hen dre un tevadur eus ar c'horf malpigiat, a vir ar c'helligoù gorre anezhañ o c'hraoñelloù.

squameux ◇ *squamous* ◇ *gourc'hennek* aa., *gourc'hennat*, *gourc'hennus* O naouiñ dre baoted vras pe vrasoc'h eus gourc'hennoù. Komzet e vo eus *kroc'henfo gourc'hennek* (Gl. *dermatite squameuse*), eus *gwezfo gourc'hennus* (Gl. *cheillite desquamatrice*), eus *plakennoù gourc'hennat* (Gl. *plaques squameuses*).

squelette ◇ *skeleton* ◇ *atel* g. Hollad an eskern oc'h amparañ kebradur ar c'horf. Dre astenn ster, luniadur reut un organ, ur gellig, pe un ardivink (e metal da skouer).

squihre ◇ *scirrhus* ◇ *skirr* g. Seurtad karkinom gant kourzadoù tev ha gwevn. — *s. isteñvel* : neridigezh ar gwiad gwiennek a zevoud steuzidigezh al logigoù hag ar c'helligoù, ha da heul, didennadur ar yoc'henn.

SRAS ◇ **SARS** ◇ *azoniad* g. *analadel lemm garv*, **AALG** Skeventad grevus diwar koronavirusoù, lemm, terzhiennek, a neuz gripel, kevredet gant ollimfokit, olpladanoù ha gwadusvec'h LDH ha CPK. An kez skeventfo anrizek tredizhus kenan zo emledet ent darreuziadek hag ent bedreuziadek da heul, o loc'hañ eus Sina e meurzh 2003 betek genver 2004.

SRS-A ou **réactif de la contraction lente de l'anaphylaxie (R.C.L.A.)** ◇ **Slow Reacting Substance of Anaphylaxis** ◇ **SRS-A**; *gwezher* g. *argrezañ gorrek an darwalladezh (GAGD)* Unan eus hanteradoù an dreistkizidigezh hogozeke. Ul lipid trenkek eo, dilaosket da vare ar bleuz darwalladel, o tevoudañ un argrezañ gorrek ha hirbad eus ar c'higennoù levn hag ivez un heforshaat eus ar gwazhied. Amparet eo gant leukotrienoù.

SRV ◇ **SRV (Small Round Virus)** ◇ **VBR (viruz g. bihan ront)** Seurtad *parvovirus* kiriek gant an den da greuzpervezfoioù lemm.

stable : *courant* ~ ◇ **stable current** ◇ *tredanred* g. *a-ziflach* *Red tredan a-ziflach* eo an anv roet pa vez miret fest an elektrodoù war ar c'hroc'hen e-doug un dalc'h, a-gevenep da *red tredan a-flach* pe *red tredan ampadek*, pa vez lakaat un pe an daou elektrod da riklañ war c'horre ar c'horf.

stabilisateur de membrane ◇ **stabilizer of membrane potential** ◇ *aroustaler* g. *koc'henn* Danvezenn o lenañ ouzh koc'henn ar gellig o tolc'hañ an ionganioù (o virout ouzh an ion Na⁺ ha K⁺ a vont a-dreuz dezhi) hag o lakaat ar gellig er paouez (gwered "dieraeziñ lec'hiek") e stad a gempouez tredanel. Arveret e vez reoù 'zo eus an danvezennoù-se er yac'haat, ar c'hinin ha betadolc'herioù 'zo.

stade ◇ *stage*, *stadium*, *phase*, *period* ◇ *lankad* g., *pazenn* b., *stad* b. Pep hini eus an derezioù a c'haller diverzhout en un anadenn, e-doug diorreadur ur bevedeg, e dedro ur c'hleñved, h.a.

Stagnara : *appareil de* ~ ◇ **Stagnara's device** ◇ *ardivink* g. **Stagnara** Stignadell dehirañ diastal al livenn gein, arveradus ent baleadel.

Stagnara : *corset de* ~ ◇ **Stagnara's corset** ◇ *korfkenn* g. **Stagnara** Seurtad korfkenn evit an dreuzwareion.

Stagnara : *plâtre de* ~ ◇ **Stagnara's plaster** ◇ *plastrenn* b. **Stagnara** Plastrenn dehirañ evit prederiañ an treuzwarioù.

stalagmométrie ◇ *stalagmometry* ◇ *stalagmometriezh* b. Savelañ niver takennoù ul liñvenn evit un ec'honad par da 1 mL. Kevaraezañ a ra an hentenn-se desavelañ ur c'heñver etre tennder gorre an kez liñvenn ha hini an dour strilh. Arveret e vez evit dezventañ an halioù bestlel en troazh.

standard : *réactions* ~ *de la syphilis* ◇ **standard tests of syphilis** ◇ *prouadoù skoueriek ar sifiliz* Erwezhoù gwadveizel ar sifiliz dewerc'het gant antigenoù dibabet evit o c'hizidigezh hag o spesadelezh (sl. *présomptives* : *réactions* ~ *de la syphilis* ha *syphilis* : *diagnostic biologique de la* ~).

Stanescu : *syndrome de* ~ ◇ **Stanescu's syndrome** ◇ *azoniad* g. **Stanescu** Azoniad hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek o kevredin un askornvibar klopenndremmel a rizh dibarek, ur skorted kreskiñ a neuz migornvideñvek hag un tevadur muiek eus kaen an eskern hir. Nes eo an azoniad-se d'ar piknodizostoz.

stannose ◇ **stannosis** ◇ **stannoz** g. Erzerc'hadoù pistriel devoudet gant ar staen, skeventel pergen, dre zewentadur burezhioù pe uloc'hioù halioù staen.

stapédectomie ◇ *stapedectomy* ◇ *stleugezvenañ* Dilemel surjiane ar stleug, unan eus lankadoù ar wezhiadenn surjiane evit prederiañ ar vouzardet diwar otospongios, heuliet gant erlec'hiañ un osod ouzh ar stleug.

stapédien ◇ *stapedial* ◇ *stleugel* aa. A-zivout ar stleug.

staphylectomie ◇ *staphylectomy* ◇ *stafilomezvenañ* Dazbidañ ur stafilom a 'r gornsae.

staphylématome ◇ *staphylhematoma* ◇ *gwatoñv* g. **an hugenn** Gwatoñv an hugenn.

staphylyte ◇ **staphylitis** ◇ **hugennfo** g. Tanijenn an hugenn.

staphylococémie ◇ **staphylococcaemia** ◇ **stafilokokegezh** b. Bezañs stafilokok er gwad.

staphylococcie ◇ **staphylococcia** ◇ **stafilokokiezh** b. Nep poreadur diwar stafilokok. — *s. yud ar fas* (Gl. *s. maligne de la face*) : stad wadlestek gant tromboflebit ar god keviaoek a-wechoù, arsellet e-doug heskedoù 'zo a 'n askell fri hag a 'r weuz krec'h.

Staphylococcus ◇ **Staphylococcus** ◇ **Staphylococcus** Genad bakteri eus kerentiad ar *Micrococcaceae*, kok Gram muiel, a vent vihan (war-dro 1 µm), stalet a vlokadoù direoliek, anaerant anret, kimivevdeñvek ha katalazvuiek. Kavet e vezont evel arvevaded pe/hag evel gwezherioù kleñvedus an den hag al loened.

staphylocoque ◇ **staphylococcus** ◇ **stafilokok** s. Kok gougevret ouzh ar genad *Staphylococcus*. — *s. koagulaz leiel* (Gl. *s. coagulase négatif*) : hep koagulaz.

staphylokinase ◇ **staphylokinase** ◇ **stafilokinaz** g. Enzim fibrinloezus douhennet eus siladoù tiñvadur stafilokok aourliv 'vo pe dewerc'het dre hilouriezh. Hangaet evel ar streptokinaz ez eo berr kenan e hanterhoali.

staphylome ◇ **staphyloma** ◇ **stafilom** g. Anaf ar voull lagad o c'hoarvezout eus un dosenn anreol eus al lersae e dianlen ur skoanadur kleizennel. Ganedigel e c'hell bezañ (sl. *myopie*; *kératocône*, *cornée conique*; *kératoglobe*).

staphyloplaste ◇ **staphyloplasty** ◇ **hugennatelviñ**, **stavnatelviñ** Dazluniañ surjaniel goude kolloù danvez ar ouel stavn, dre unanatelviñ.

staphylopphaphie ◇ **staphylopphaphy** ◇ **hugenndlita**, **stavndlita** Krafaelañ ur skarr ganedigel eus ar ouel stavn, a se an heñvelster *stavndlita*.

staphyloptomie ◇ **staphyloptomy** ◇ **stafilomenbenañ** Gouvenañ ur stafilom a 'r gornsaer.

staphylotoxine ◇ **staphylotoxin** ◇ **stafilotoksin** g. Toksin bore'het gant ar stafilokok.

Stargardt : **maladie** ou **syndrome de ~** ◇ **Stargardt's disease** ◇ **kleñved g. Stargardt** Dic'henezhadur brizhennel argammedek hêrezhel ar yaouerion o tarvezout ar peurliesañ a-raok ar gaezoureezh, o kas d'an dallentez.

Stark-Kaeser : **syndrome de ~** ◇ **Stark-Kaeser syndrome** ◇ **azoniad g. Stark-Kaeser** Furm kahesterieñv a-livenn spilhenn-skoaz o tarvezout en oadouriezh. Ur c'hleñved hilel eo, dibaot kenan, diwar dizhad neuronenn loc'hañ ar mel a-livenn, treuzkaset hervez ar mod aotozomek trec'hek.

Starling : **loi de ~** ◇ **Starling's law** ◇ **saveleñn g. Starling** Saveleñn o tenaouiñ an daveadur etre nerzh argezañ ar galon hag ar bolc'hadur anezhi.

stase ◇ **stasis** ◇ **dassav** g.; **-kae** g.; **-anred** g. Leiad pe arsav amred ar gwad pe red ul livenn er bevedeg. Da skouer : *dassav ar gwad* (Gl. *stase sanguine*), *gwadkae* (Gl. *hémostase*); *dassav ar mon* (Gl. *stase fécale*), *mondassav* (Gl. *coprostase*); *bestanred* (Gl. *cholostase*). — *dassav pervezel* (Gl. *stase intestinale*) : gorrekadur kleñvedel padvezh tremen ar boued er pervez.

staso-basophobie ◇ **stasobasiphobia** ◇ **arur** g. **ar sav-kerzh** Dic'hallusted d'emzerc'hel war-sav ha da gerzhout, devoudet gant an aon da gouezhañ, e kemm ouzh *arur an ansav-ankerzh* devoudet gant ankounac'haat (ankoun) fiñvoù ar c'herzhed.

statine ◇ **statin** ◇ **statin** g. Lia kolesteroldwadisvec'hier dre heudiñ an HMG CoA reduktaz.

station thermale ◇ **spa** ◇ **havdrev** b. **-ioù** Kêr enni ur c'hurdi d'ar prederiadur dre an dourioù havel.

statique : **sens ~** ◇ **static sens** ◇ **eraeziñ diasavel** Hollad ar santadurioù gougoret gant ar sanioù hantergelc'hiek ha rakkamb ar milendall. Ar re gentañ a zitour dure'hadur hon penn en egor hag an eil hon lak da verzhout al loc'hadoù treuzkludañ.

Stauffer : **syndrome de ~** ◇ **Stauffer's syndrome** ◇ **azoniad g. Stauffer** Avuusvent lezhanweel e-doug kankr al lounezh.

stéarolé ◇ ◇ **druzad** g. Angevezh liael a zo an ambrougenn bennañ anezhañ un druzenn, evel an *ogan* da skouer.

stéarrhée ◇ **stearrhoea** ◇ **druzoul** g. Druzennoù dioulet a-fonn gant ar mon; azoniad paot en anafoù an ilgreiz, dreist holl pa vezont kevredet gant anafoù an avu.

stéatocytomes multiples ◇ **steatocytoma multiplex** ◇ **steatokitom** g. **liesel** Anaez kroc'hen an tal, ar gouzoug hag ar bruska, anezhañ lies kist blevsoavel.

stéatolyse ◇ **steatolysis** ◇ **druzloezañ** Ur behinloezañ eo an druzloezañ, eleze un dourannadur eus an druzennoù dre o livrizhañ, kent bezañ desunet gant ar gwad.

stéatolytique ◇ **steatolytic** ◇ **druzloezus aa.**, **druzloezur aa. & g.** A-zivout un danvezenn en araez da loezañ an druzennoù.

stéatome ◇ **steatoma** ◇ **steatom** g. Anvad roet d'al lipomoù kalet ar c'hantalc'h anezho hag ivez d'ar c'histoù soavel.

stéatomérie ◇ **steatomery** ◇ **behindoñv** g. Daspugnad behin dindan groc'hen talbenn diavaez an divlezh hag an divvorzhed gant ar maouezed yaouank, o reiñ d'ar c'hroc'hen un neuz vourellet pe galfrezet.

stéatonécrose ◇ **steatonecrosis** ◇ **behinvarvenn** b. Marvenn ar gwiad behinel, a gaver dreist holl gant an ilgreizfo lemm gwadliñvus e par an danter hag ar gandedenn.

stéatopygie ◇ **steatopygia** ◇ **peñsvehinegezh** b. Diorreadur reñverek gwiad behinel ar peñsoù, naous d'ar beneved san ha koisan.

- stéatorrhée idiopathique** ◇ **idiopathic steatorrhoea** ◇ **druzoul g. hennadek** Anvet ivez kleñved torel, kleñved Gee (sl. *cœliaque* : *maladie* ~, *maladie de Gee*).
- stéatose** ◇ **steatosis** ◇ **steatoz g.** Dreistkarg lipidoù (triglikéridoù) e kitoplasm ar c'helligoù, oc'h erzerc'haat pe un dic'henezhadur anezho, pe un ensiladur.
- stéatose pulmonaire** ◇ **lipoid pneumonia** ◇ **steatoz g. skevent** Anvet ivez *skeventfo behinek* pe *skeventfo eoulek*, anaez dibaot, nebeut anavezet, arsellet dreist holl gant ar vugale yaouank, dezhañ nebeut a arouezioù klinikel (paz a gaouadoù, kraostañ nebant, diwezhatoc'h trec'hwez ha dulaz) ha dinoet a-wechoù dre ar skinluniñ hepken, o tiskouez nozelennoù demer strewet er skevent. Kirieget eo bet an enberadurioù eoulioù liael er fric'hargadenn.
- stéatotrochantérie** ◇ **steatotrochanteria** ◇ **lezvehinegezh b.** Behinegezh lec'hiet en divlezh.
- Steele, Richardson et Olszewski** : **maladie ou syndrome de ~** ◇ **Steele-Richardson-Olszewski syndrome** ◇ **azoniad g. Steele, Richardson ha Olszewski** Seizi dreistgronnel argammedek nervzic'henezhadel, gant seizi diazerc'h ha diadu ar sell, kevredet gant un anfiñv eus ar fas hag eus an izili, un ustang gant astennadur an askil, ur mouezhvibar, ur bretonk. Ar c'hleñved-se a gas d'ar marv en un nebeut bloavezhioù. Heñvelster : *lagadseizi dreistgronnel argammedek*.
- Stein-Leventhal** : **syndrome de ~** ◇ **Stein-Leventhal syndrome** ◇ **azoniad g. Stein-Leventhal** Azoniad o tarvezout gant ar vaouez yaouank, naouus dre un mizanliñv, ur c'haonac'hded hag ur greoñegezh a-zalc'h gant ur vierezfo sklerokistek.
- stellectomie** ◇ **stellectomy** ◇ **stellektomiezh b., steredennezvenañ** Dazbidañ ar gangrenn steredennek (ar gangrenn c'houzoug-brusk).
- Stellwag** : **signe de ~** ◇ **Stellwag's sign** ◇ **arouez b. Stellwag** E kleñved Basedow, serridigezh diglok an daoulagad gant hiradur faout ar malvennoù, pa gav d'ar gouzrec'h en deus o serret (pennsac'h bourbellus).
- sténocardie** ◇ **stenocardia** ◇ **kevenkez g., kevenkez bruched, kevenkez kalon, kalonank g., glaz b. kalon, bruskost b., brennidost b.** (sl. *angor, angor pectoris, angine de poitrine*).
- sténocéphalie** ◇ **stenocephaly** ◇ **tourbennegezh b.** (sl. *acrocephalie*).
- sténochorde** ◇ **stenokord g.** 1 *S. araoik* : beskell o vont eus ar spernenn a-goazez d'an endan-gaezour. 2 *S. adreñv* : beskell o vont eus ar spernenn a-goazez betek deun an ask a-goazez bras. An div linenn-se, a c'haller muzuliañ gant ar bizied, a gevaraez, lizh da Ritgen, jediñ ampled ha derez digemparzh al lestr.
- sténose hypertrophique du pylore** ◇ **hypertrophic pyloric stenosis** ◇ **isvoll g. usventek ar porzhier** Anvet ivez *isvoll porzhierel ar magadelled* : usvent muiek gwiskad kaher ar porzhier, arsellet diouzhtu goude pe damc'houde ar c'hanedigezh, o tevoudañ, ma ne embreger ket ar porzhierenbenañ, antreizh klok gwask ar porzhier, an disvezhur herrek hag ar marv.
- Stenotrophomonas maltophilia** ◇ **Stenotrophomonas maltophilia** ◇ **Stenotrophomonas maltophilia** Spesad bakterieus kerentiad ar *Pseudomonadaceae* kiriek da boreadoù koulzataer.
- stent** ◇ **stent** ◇ **stent g.** (sl. *endoprothèse*).
- stentless** ◇ **stentless** ◇ **distent aa.** A-zivout trapigosodoù 'zo a 'n aortenn, hep kebradur.
- stéphanocyte** ◇ **stephanocyte** ◇ **stefanokit s.** Kelligoù a 'r retinokitom stalet e rodigoù.
- steppage** ◇ **steppage gait** ◇ **argenk g. tusus** Argenk naouus dre gouezh momeder an troad, o rediañ da sevel ar glin en ur bleañ reñverek ar vorzhed. Azonañ a ra un divig eus kigennoù uhelaer an troad.
- stercobiline** ◇ **stercobilin** ◇ **sterkobilin g.** Livegenn diwar zispenn ar bilirubin glikurokeveilat e-kerz ar c'hoaz-hañ pervezel.
- stercobilinogène** ◇ **stercobilinogen** ◇ **sterkobilinogen g.** Livegenn diwar zispenn ar bilirubin e-kerz ar c'hoaz-hañ pervezel, diaraoger ar sterkobilin.
- stercolithe** ◇ **stercolith** ◇ **monvaen g.** (sl. *coprolithe*).
- stercoraire, stercoral** ◇ **stercoral** ◇ **1 oulennek aa., kaoc'hek aa., monek aa. 2 oulennel aa., kaoc'hel aa., monnel aa.** (sl. *fécal*).
- stercorémie** ◇ **copraemia** ◇ **gwadkaoc'hegezh b.** Bezañs kaoc'h er gwad, e dianlen azdalc'h an oulennoù er pervez, hag ivez an direizhoù diwar ar pistriadur devoudet gant an tremen-se er gwad.
- stéréo-agnosie** ◇ **stereo-agnosia** ◇ **andenaoud stekiñ, stokandenaoud** (sl. *agnosie tactile, astéréognosie*).
- stéréocampimètre** ◇ **stereocampimeter** ◇ **ec'honwelvaezier g.** Ardivink a gevaraez muzulioù en teir ment hag a vez arveret da vuzuliañ ur skotom kreiz untu ha da vuzuliañ sioù ahel kreiz al luc'hsae. An imbours'h-se a reer *ec'honwelvaezierenzh* anezhañ.
- stéréocardiogramme** ◇ **spatial vectorcardiogram** ◇ **kalonsturiadwezad g. teirment** Kedaozad an tri sturiadwezad lerc'hwezet hervez ar plaennoù a-dal, a-zremm hag a-saezh (sl. *electrocardiovectogramme, électrocardiogramme vectoriel, vectocardiogramme, vectogramme*).
- stéréocil** ◇ **stereocilium** ◇ **stereokil s.** Bodennoù difiñv ur gellig epitelel.
- stéréognosie** ◇ **stereognosis** ◇ **stokdenaout** Galloud da hennadiñ an traezoù dre an teuta o lakaat da zasperzhiañ war un dro ar stokeraeziñ, ar gwaskeraziñ hag an doneraziñ.

- stéréognostique** : sens ou perception ~ ◇ **stereognostic sense** ◇ **merzhout stokdenaoudel** Galloudezh da hennadiñ dre an teuta stumm an traezoù hag ivez ar perzhioù fizikel all anezho, evel ar c'hantalc'h, ar gwrezverk, ar pouez, h.a. N'eus ket ur skiantenn anezhañ, hogen kevreted lies mod eraeziñ elfennel, o tont eus an eraeziñ gorre- ha donfraouadel.
- stéréoradiographie** ◇ **stereoradiography** ◇ **stereoskinluniñ** Imbourc'h diwar-bouez ur stereoskop, ardivink optikel a gev-araez gwelout ergorennoù e teir ment dre gedaozañ div skeudenn eus an un ergorenn.
- stéréospécificité** ◇ **stereospecificity** ◇ **stereospesadelezh** b. Hangediusted kimiek evit unan eus an daou izomer eus ur c'hediad : izomerioù drec'hel pe izomerioù ec'honel diwar lec'hiadurioù kevarall eus ur stroll soazel e-keñver un atomenn garbon.
- stéréotaxie** ◇ **stereotaxia** ◇ **ec'hondrevnañ** En nervsurjianerezh hag en nervskinouriezh, hentenn skinluniñ a dalvez da spislec'hiañ luniadoù enkloupenneel 'zo diouzh an teir ment.
- stéréotaxique** ◇ **stereotactic** ◇ **ec'hondrevnadel** aa. Oc'h arverañ ur spislec'hiañ teirment.
- stéréotypé** ◇ **stereotyped** ◇ **bloc'heiladek** aa. O toareañ jestroù arreet andiarvenn, hep gliziegezh ar skruzioù avat.
- stéréotypie** ◇ **stereotypy** ◇ **bloc'heiladegezh** b. Arreadur diastal gerioù, jestroù, skruzioù, h.a., arsellet e-kerz kleñvedoù 'zo eus an nerveg.
- stérilet** ◇ **intrauterine contraceptive device** ◇ **linkell** b. Stignadell hilastaliñ stalet er grozh, o virout ouzh ar vigellig a enneizhiañ.
- stérilisation** ◇ **sterilization** ◇ **1 dishadennañ** **2 gaonac'haat** 1 Distrujañ an holl c'harvevion bezant en ur metoù bevel, en un danvezenn pe war un draezenn bennak, dre araezioù fizikel (gwrez, skinata, h.a.) pe kimiek (dilesterioù). 2 Lemel trebadek, darvoudel pe diarvennel, eus ar varregezh ouennañ.
- stérilité** ◇ **sterility** ◇ **1 dishadennded** b. **2 gaonac'hded** b. 1 Ezvezañs nep garvev en ur metoù bevel, en un danvezenn pe war un draezenn bennak. 2 Divarregezh da ouennañ, dianlenat d'ur strafuilh arc'hwelel pe d'un naoued e par ar benvegad genel.
- Sterling** : **phénomènes** ou **réflexes de** ~ ◇ **Sterling's reflex** ◇ **damougou l. (g.) Sterling** 1 Plegadur ar pevar biz diwezhañ ha nesadur ar meud devoudet gant kiziata talbenn palvel an oeñsoù pellek, e degouezh tizhad an hordenn bikernennek. Kevatal, evit an dorn, damoug Rossolimo. 2 Seurtad kevelfinv : ar vrec'h diouzh an tu seizet ha dargrezet a zilec'h ent andiarvenn o pellaat pe o nesaat, pa eneber ouzh ar finv keñverek diouzh an tu bonan.
- sternalgie** ◇ **sternalgia** ◇ **klerennost** b. Laur lec'hiet a-dreñv ar glerenn, heñvelster kozh *bruskost, kevenkez, brennidost*.
- Sternberg** : **cellule de** ~ ◇ **Sternberg's giant cell** ◇ **kellig b. Reed-Sternberg** (sl. *Reed : cellule de* ~).
- sternochondroplastie** ◇ **sternochondroplasty** ◇ **atelviñ klerenn-migern, klerennvigernatelviñ** Gwez surjaniel amkanet da zereizhañ ar furmoù muiek a vrusk trezeriek. C'hoarvezout a ra a sevel pe eilpennañ an talp klerenn-kostoù.
- sterno-cléido-mastoïdien** : **muscle** ~ ◇ **sternocleidomastoid muscle** ◇ **kigenn** b. **glerenn-trebez-brennigenn** Kigenn eus rannbarzh raogkostezel ar gouzoug, pleger ha c'hweler ar penn.
- sternodorsal** : **diamètre** ~ ◇ **sternodorsal diameter** ◇ **treuzkiz** b. **klerenn-livenn** Treuzkiz a-saezh ar grouell o vont eus ar glerenn d'al livenn gen.
- sternogramme** ◇ **sternalgia** ◇ **klerennrestrad** g. Melrestrad gounezet dre ezwanañ diouzh ar glerenn.
- sternopage** ◇ **sternopagus** ◇ **sternopag** g. Euzheg krouellel daouat a zo an daou berzhiad anezhañ unanet tal ouzh tal adalek ar begel betek parzh uhelañ ar brus.
- sternotomie** ◇ **sternotomy** ◇ **klerennenbenañ** Skejañ surjaniel ar glerenn.
- sternutation** ◇ **sternutation** ◇ **streviata** Streviata arreet.
- sternutatoire** ◇ **sternutatory** ◇ **strevius** aa. O tec'han streviadennoù.
- stéroïde** : **hormone** ~ ◇ **steroid hormone** ◇ **hormon** g. **steroidel, steroid** g. Hormon eus ar stroll hormonoù ganadel ha kaenuslouezhel a zo an delun kimiek anezho deveret eus an atel pevarc'horvellek o naouiñ ar steroloù hag a zo amparet diwar ar c'holesterol.
- stéroïdogénèse** ◇ **steroidogenesis** ◇ **steroidparañ** Paridigezh ar steroidoù.
- stérol** ◇ **sterol** ◇ **sterol** g. Anv hollek an alkoooloù lieskorvell dezho un tolz mol uhel, bezant er bevedegoù loenel pe blantel, naous ent luniadel dre gevreted an fenantren hag ar c'hiklopentan. An hini pouezusañ er bevedeg zo ar c'holesterol.
- stertor** ou **respiration stertoreuse** ◇ **stertor** ◇ **stertor** g. Analerezh trouzus a-ser gant roc'hadennou.
- stéthacoustique** ◇ **stethacoustic** ◇ **bruchselouennadel** aa. A-zivout un trouz a glever dre selaouennañ ar bruched.
- stéthoscope** ◇ **stethoscope** ◇ **stetoskop** g. Ardivink amkanet d'ar selaouennañ handizhek, ijinet gant Laennec e 1816. Kevaraezañ a ra treuzkas trouzioù ar c'horf (ar bruched pergen) da skouarn ar mezeg. Ar *s. divskouarnel* a c'hoarvez eus daou skour o vont klenk ouzh divskouarn an imbourec'her. Ar *s. amiegel* zo un duellen e stumm ur c'horned arveret da selaouennañ ar grouell a-dreuz da speur kof ar vamm.
- Stewart-Bluefarb** : **syndrome de** ~ ◇ **Stewart-Bluefarb syndrome** ◇ **azoniad** g. **Stewart-Bluefarb** Kammneuziad wazhiedel ar bleñchoù nes da sarkomatoz liesel gwadliñvel Kaposi, o tarvezout gant gouzrec'hed tizhet gant ur fic'h pe un darvoll talmerenn-gwazienn.

Stewart-Holmes : *épreuve de* ~ ◇ **Stewart-Holmes phenomenon** ◇ *proud g.* **Stewart-Holmes** Goulenn a reer ouzh ar gouziviad plegañ a-nerzh e arvrec'h war e vrec'h, an imbours'her o herzel ouzh ar fiñv dre zerc'hel e arzorn. Pa laosk an imbours'her an arzorn a-daol-trumm e vez reolet buan ar plegadur gant ur gouzrec'h bonan, tra ma vez reñverek ar plegadur e degouezh a azoniad ilpennel (dre berzh an dale argrezañ ar c'higennoù gourzhaler) ha stekiñ a ra ar gouziviad e skoaz gant e veilh dorn.

Stewart et Treves : *syndrome de* ~ ◇ **Stewart- Treves syndrome** ◇ *azoniad g.* **Stewart ha Treves** Dinodadur ul limfangiosarkom war ur vrec'h limfc'houlitnek war-lerc'h bronnezvenañ dre benn ur c'hankr.

sthénique ◇ *sthenic* ◇ *eniñvel aa.* Nerzh bevedel, an eniñv.

stibio-intolérance ◇ *antimony intolerance* ◇ *angougemer g.* **stibiom** Prederiet e vez al leichmaniozoù dre an haliou stibiom (hag ur foueastaler), ar miweredoù o vezañ un angougemer a rizh darwalladel ouzh ar stibiom hag ivez ur pistriadur gant ar stibiom dre usvec'h e dibenn ar prederiadur.

Stierlin : *image de* ~ ◇ **Stierlin's sign** ◇ *arouez b.* **Stierlin** Skeudenn skinluniñ, anezhi ul leuniadur fall pe un angougemer eus ar sac'henn da geñver un enema baritek. Sellet evel un arouez naouus d'an dorzhelegezh klunegenn-sac'henn, emañ an kez arouez en ervez da vezañ kavet en anafoù foel antorzhelek 'zo.

stigmat ◇ *stigma* ◇ **1 dianol g. -où 2 naouenn b. 3 merk g. -où 4 gwarzhnod g.** 1 Kleizenn, merk padek e dianlen ur gouli pe ur c'hleñved. 2 Arouez klinikel trebadek dezhi un talvoud bennak evit an deznouiñ. 3 Merkoù kroc'hen war gorf kevrinaded 'zo. 4 Merk divalav pe vezhus.

stigmatisme ◇ *stigmatism* ◇ *stiegezh b.* Perzh ur reizhiad optikel o reiñ, evit ur poent, ur skeudenn a zo ur poent ivez, ha da heul e vo spis skeudenn un ergorenn.

stilboestrol ◇ *stilboestrol* ◇ *stilbestrol g.* Danvezenn estrogen kevanaozel, an dietilsilbestrol (DES), difenol kevanaozel, erskrivet dindan an anv *distilben* adalek 1938. Da heul direizhoù ganadel ha kammneuziadoù gant ar vugale ganet diouzh maouezet euvret DES ganto, gant ar merc'hed adalek ar gaezouregezh riskloù kankr ar gouin hag ar grozh, gaonac'hded hag evit ar baotred isvoll ar c'han troazh, kistoù an argell, kammneuziadoù ar c'han troazh, kelgellegezh, degouezhioù a isteñv klidennel hag ivez ul leiadur eus heberzh ar sper (olsper), e voe berzet erskrivañ al lia-se d'ar merc'hed dougerez. Hogen dieilto e oa gweredoù argevezh al lia evit an diskennidi lakaet en ardiz an DES *in utero* etre 1940 ha 1980. Neoazh e vez erskrivet an distilben c'hoazh evit ar c'houziviaded gant dasseziou kankr ar raksavenn, e werc'husted o vezañ bet prouet e 1941 gant an droazhourion Charles Huggins et Clarence Hodges (skol veur Chicago).

Still : *souffle de* ~ ◇ **Still's murmur** ◇ *sourr g.* **Still** Sourr mez-pe deroù- ha mezsistol froumel ec'hanafel, merzhet gant ar vugel a-hed lodenn izelañ ribl kleiz ar glerenn.

Stiller : *signe de* ~ ◇ **Stiller's sign** ◇ *arouez b.* **Stiller** Loc'husted ezreol an dekvet kostenn a vez kavet gant ar c'houzrec'hed tizhet gant islink ar flugez ha dreist holl gant al lounezh heloc'h pe gant usvoll antantel ar c'hreuz.

stimulateur cardiaque ◇ *pacemaker* ◇ *adalf g., broudalf kalvezadel, tredanfraouaer g. -ioù kalon* Ardivink elektronek garventekaet enstudeet dindan groc'hen ar bruski, amkanet da fraouaat, diouzh ur gorvez savelet, ur galon dezhi kreizzennoù emgefren bevedel diaraez da gefleuniañ o arc'hwel. C'hoarvezout a ra eus ur glozenn enni tredangelloù liotim hag elektrodoù festet er c'halongaher kofigel. Lies rizh zo : adalfoù ec'houbred oc'h arc'hwelañ ent trebadek ; adalfoù goubred oc'h arc'hwelañ e degouezh sistolioù kentez tolc'het hepken ; tredanfraouaer azhentañ pe *guder* o tiaskañ e degouezh a baouez korvez. Adalfoù all zo goulevadus pe divgavenn oc'h assav ar gemalenn genter-kofig bonan.

stimulateur cardiaque : *bruit de* ~ ◇ *pacemaker sound* ◇ *trouz g.* **adalf** Stlak merzhet a-wechoù pa selaouenner kalon ur gouzrec'h, a-raok an trouz kentañ hag ardaolet ouzh ur fraouadur eus ar gerc'hspereunn pe eus kigennoù speur ar bruski. Kevret e vez ur skog teutadus.

stimulateur cardiaque : *syndrome du* ~ ◇ *pacemaker syndrome* ◇ *azoniad g.* **an adalf** Miweredoù devoudet gant un adalf. Bez' e c'hell bezañ skorted kalon, iswask pe kevenkez bruched delusket gant ur fraouadur kofigel dezhañ un talm ankevazas, gant un diazalc'h anazas etre an argrezadoù kentez hag an argrezadoù kofig, pe ivez e c'hell bezañ kalonustead de-c'hanet pe trezalc'h diat gant ur c'hizren (*kalonustedadoù adenankat elektronek* pe *adenankadoù elektronek*) e degouezh ur "fraouaat divgavenn" oc'h angorzhañ kentez ha kofig dehou.

stimulateur neurologique ◇ *spinal cord stimulator* ◇ *tredanfraouaer g. nerval, nervfraouaer g.* Ardivink amkanet da brederiañ al laur henek a orin nerval. Un nervfraouaat — tredanskog ganet gant an ardivink —, a zevoud ur c'hammeraez, o tarallañ merzhidigezh al laur gant ar gouziviad. Desezet eo an trevnad gant ur surjian e-kerz ur wezhiadenn surjanel tregroc'henek, pe diwar-bouez ul lavnennezvenañ e kavenn ar mel a-livenn e degouezh a fraouadur livennvelel, pe e-kichen an nervenn da fraouaat. Goude e tessez ur ganer tredanskogou er c'hof pe e krec'h ur feskenn, ha kennasket eo ar gleuzenn ouzh ar ganer diwar-bouez un neudenn.

stimulateurs cardiaques : *code international des* ~ ◇ *pacing code* ◇ *boneg b.* **etrevroadel an adalfoù** Heuliad lizherennoù (etre 3 ha 5) oc'h arouezñ rizh an ardivink enstudeet. An teir lizherenn gentañ zo ar re bouezusañ :

- Al lizherenn gentañ a arouez ar gavenn ma c'hoarvez ar fraouadur : hini ebet (O), ur c'hentez (A), ur c'hofig (V) pe an daou (D).
- An eil lizherenn a ziskouez ar gavenn ma 'z eo c'hoarvezet an dinoadur : hini ebet (O), ur c'hentez (A), ur c'hofig (V) pe an daou (D).

- An trede lizherenn a zitour respont an adalf d’an dinoadur : heudiñ (I), fraouaat (T), an daou (D) pe hini ebet (O).
- Ar pevare lizherenn a zenaou war vezañs (R) pe ezvezañs (O) eus emzasadur an talm fraouaat da gevassav an talmangwezh, eleze ha yevet eo an adalf ouzh ar striv pe get.
- Ar pempet lizherenn a ziskouez bezañs pe ezvezañs ur fraouaat liesload : hini ebet (O), ur c’hentez (A), ur c’hofig (V) pe nep kenaozad eus A pe V (D).

Bez’ ez eus bremañ adalfoù hep sont ha hep klozenn : kevaraezañ a reont ur fraouaat unkenvenn hep sont. Yevet int ouzh gwrezverk ar c’horf, pezh a ro tu da vuiaat tead ar galon mar kresk gwrezverk ar c’horf. Desezet war-eeun er c’hofig dehou diwar-bouez ur c’hateter ebarzhet e gwazhienn ar vorzhed (e-kichen pleg ar varlenn), ne rekizont gwezhadenn surjaniel ebet, ha n’eus kleizenn ebet enta.

stimulation ◇ **stimulation, pacing** ◇ **1 fraouaat 2 kentraouiñ 3 kentrigañ** Evit diskouez durc’hadurioù ster an tri hanc’herse e vo roet un nebeut skouerioù evit pep hini. An hini kentañ zo un deverad eus Br. *froù* (Gl. *état de stimulation*). Graet e vez gant *fraou-* evit an deveradoù. Diwar ster ar kBr. *freu* hag ar BrE. *freù* “buhezek, dibilh, bagol” e tenn *fraouaat* etrezek “dihuniñ, adveaat, hetaat”. An daou dermen all zo deveradoù diouzh Br. *keñtr*, alese o durc’hadur ster “lakaat birvillh, broudañ gant un taol keñtr”.

1 Fraouaat :

- ▷ dibenn an nervennoù santout fraouaat gant kentrigennoù *terminaisons des nerfs sensitifs stimulées par des stimuli*
- ▷ fraouaat an difenn hangae enep ar poreoù *stimuler la défense immunitaire contre les infections*
- ▷ hormon o fraouaat ar vierez *hormone stimulant l’ovaire*
- ▷ o fraouaat borc’hadur an hormon *stimulant la sécrétion de l’hormone*
- ▷ o reoliñ an erwezhoù hangaeel dre o heudiñ pe dre o fraouaat *qui règle les réactions immunitaires en les inhibant ou en les stimulant*
- ▷ hanterad kimiek o fraouaat ar buzerioù adrenwerc’her α *médiateur chimique qui stimule les récepteurs adrénérgiques*
- ▷ lia o fraouaat an oberiezh empenn *médicament stimulant l’activité cérébrale*

2 Kentraouiñ :

- ▷ kentraouiñ kreizennoù an analañ (amfetamin) *stimuler les centres respiratoires (amphétamine)*
- ▷ Euvret a zoenadoù bihan e kentraou an nerg (kinin) *ingérée à petites doses, elle stimule le système nerveux (quinine)*
- ▷ kentraouiñ ar c’hoant revel *stimuler le désir sexuel*
- ▷ o kentraouiñ arc’hwelerezh reizhiadoù diseurt ar bevedeg *qui stimule le fonctionnement des différents systèmes de l’organisme*
- ▷ o kentraouiñ borc’hadur ar vestl *qui stimule la sécrétion de la bile*

3 Kentrigañ :

- ▷ kentrigan kroc’hen *stimulation cutanée*
- ▷ kentrigan parzh diavaez ar sol troad *stimulation de la région externe de la plante du pied.*

stimulation cardiaque orthorythmique ◇ **orthorhythmic pacing** ◇ **kalonfraouaat korvezeeunadel** Enluskañ tredanel ar galon diwar-bouez ur sont enkavennel kenereet ouzh un tredanfraouer diavaez.

stimulation ovarienne ◇ **ovarian stimulation** ◇ **fraouaat ar vierez** Kalvezder aesaat an engehentañ, amkanet da gas ar bolc’hennoù vierez betek o azvedigezh dre ziounit gonadotrofinoù ezdeuat pe danvezzennoù o vuiaat borc’herezh ar gonadotrofinoù endeuat (sl. *hyperstimulation ovarienne : syndrome d’~*).

stimulator g. long-acting thyroid ~ ou **anticorps stimulant la thyroïde** ◇ **LATS (long-acting thyroid stimulator)** ◇ **antikorf g. skoedennfraouaer** Danvezenn o fraouaat rageeun borc’herezh ar skoedenn, kevarall diouzh an tireostimulin : dre he gwered daleet ha hirbad, dre he hanterhoali plasmatek hiroc’h, dre he ferzhioù kimiek ha hangaeel (un IgG eo). Kavet e vez an antikorf-se e gwadvez an darn vrasañ eus ar vazdoveion (sl. *immunoglobulin : thyroid stimulating ~, TSI*). Al *LATS-P* (P : *Protector*) zo un immunoglobulin (Ig) gwadveizel bezant gant an darn brasañ eus ar vazdoveion, o parraat ouzh ezniñvadur al *LATS* gant kelligoù skoedenn an den.

stimuline ◇ **1 stimulin 2 tropic or tropic hormone** ◇ **1 stimulin g. 2 stimulin ; hormon g. teñvel** 1 Danvezenn bezant er gwadveizoù spesadel, dezhi ur gwered fraouaat war ar c’helligoù gwenn, hag e-se kevaraez d’ar fagokitoz. 2 Anv genadel un teskad hormonou borc’het gant ar rakgougorfenn, en arez da vroudañ gwerederezh ar gwagrennoù enborc’hat all pe gwiadoù diseurt : an tireostimulin, ar gonadostimulin, ar c’horticotrofin, ar prolaktin hag ar somathormon.

stimulodétection ◇ **stimulodetection** ◇ **imbourc’h g. tredanfraouaat-dinoiñ ; tredanfraouaat-dinoiñ** Kalvezderioù nervennvarwezañ arveret da imbourc’hiñ an tredanvarroù dec’hanet gant un tredanfraouaat diavaez, o kevaraezañ ur studi dialuskel eus al luniadoù nervgaherel (sl. *électromyographie*).

stimulon ◇ **stimulon** ◇ **stimulon g.** Antigen viruzel dezhañ ur gweredusted enepinterferon, o fraouaat neridigezh ar viruzoù.

stimulovigilance ◇ **stimulovigilance** ◇ **adalfkost g., adalfkosterezh g.** Eveshaat adalfoù enstudeet ’zo, kefridi kefleuniet gant kreizennoù dasparzhet war diriad a-bezh ur riez, en amboaz reoliñ perzhed hag arc’hwelerezh an adalfoù.

stimulus ◇ **stimulus** ◇ **kentrigenn** b. -où, **kentrigad** Nep gwezhher diabarzh pe diavaez pe, gwered en araez da zevoudañ un erwezh a-berzh ur reizhiad vroudadus.

St-Jude medical[®] : **valve de** ~ ◇ **St Jude medical**[®] **prosthesis** ◇ **trapigosod** g. **St-Jude medical**[®] Trapigosod e karbon.

Stocker : **ligne de** ~ ◇ ◇ **linenn** b. **Stocker** Koc'hionadoù azgell ferritin e stumm ul linenn war al lersae, loet en araok da ribl ur c'hilgen.

Stockholm : **syndrome de** ~ ◇ **Stockholm syndrome** ◇ **azoniad** g. **Stockholm** Darempred diac'hinek o tiazezañ etre mac'hiaded ha skraperon, naous dre un trivliad a genhoal eus ar reuzidi ouzh ar skraperon hag un trivliad nac'hel e-keñver an aotrouniezhoù ha nerzhoù an urzh. An kez azoniad zo bet studiet adalek un degouezh laeroñsi armet en ur bank gant skraperezh mac'hiaded e Stockholm e 1973.

stock-vaccin ◇ **stock-vaccine** ◇ **vaksin** g. **kadav** Vaksin danzeet a-vras diwar lies skod eus ur virus ha kadavet en arnodva, e kemm ouzh un unanvaksin.

stœchiométrie ◇ **stœchiometry** ◇ **1 kedfeuriegezh** b. **2 feur** g. **kedaoz 3 stekimetrichezh** b. 1 **K.** un dazgwered kimiek a verk kenfeurioù an elfennoù o kediañ. 2 Evit a sell ur c'hediad ez eo feur an elfennoù en delun anezhañ. 3 Ur rann eus ar gimiezh eo ivez ma vez studiet an etreweredoù etre ar c'horfoù.

stomachique ◇ **stomachic** ◇ **kreuzhael** aa. Yac'hus evit ar stomok, oc'h aesaat ar c'hoaz-hañ kreuzel hag o vroudañ an ilboued.

stomate ◇ **stoma** ◇ **stomat** g. Korrigoenn lezet gant ar c'helligoù emdizhat o skarat ar c'helligoù endotelel, pa dreuzont ar speurioù pe pa 'z eont er-maez eus ar c'horwazhied dre dregenkañ.

stomathérapeute ◇ ◇ **ezforzhour** g. -ion Klañvidour(ez) arbennikaet en ezforzhouriezh, hollad an arouelioù d'an ezforzheion.

stomatite ◇ **stomatitis** ◇ **genaoufo** g. Nep tanienn glaourgenn ar genoù. — **g. aftus** (Sz. *aphthous stomatitis*) : genaoufo naous dre vezañs afitoù war glaourgenn ar genoù. — **g. galvaniek** : genaoufo devoudet gant bezañs er genoù eus pezhioù metalek dezho tredanvarroù diforc'h, o c'henelel ur red tredan untu (sl. *galvanisme*). — **g. breingedek** : sl. **noma**. — **g. bevargantel** (Sz. *mercurial stomatitis*) : arsellet gwechall gant ar c'houzrec'hed dezho ur prederiadur bevargantel pe o c'houzañv diwar ur pistriador bevargantel henek, naous dre un ushalviñ, ur blaz metal, un anal flaerius, ur c'hoefivadur eus ar munsunoù hag un disklosadur eus an dent. — **g. c'hweshigennek** (Sz. *vesicular stomatitis*) : anaev diwar ur *rabdovirus* o tizhout ar chatal, en ervez da vezañ treuzkaset d'an den gant doare ur grip.

stomatocytose ◇ **stomatocytosis** ◇ **stomatokitoz** g. Dourusvec'h an hemati arsellet en amwadoù gwadloezadel hêrezhel 'zo.

stomatodynïe ◇ **stomatalgia** ◇ **genaouwa** g. Laur loet e kavenn ar genoù.

stomatologie ◇ **stomatology** ◇ **genawouriezh** b. Rann ar vezekniezh gouestlet d'ar genoù hag ar c'hleñvedoù anezhañ.

stomatorragie ◇ **stomatorrhagia** ◇ **genaouwadliñvañ**, **genaouwadliñv** g. Gwadliñv er genoù.

stomencéphale ou **stomocéphale** ◇ **stomencephalus** ◇ **stomokefal** g. Euzheg dezhañ daou lagad harz-ouzh-harz pe ul lagad daouel war al linenn greizer, gant ur benvegad friel skoanet e stumm un trompilh, krakavenoù hag ur genoù diglok kenan pe ezvezant.

stomie ◇ **stomy**, **stoma** ◇ **1 ezforzhañ**, **ezforzhad** g. **2 ezforzh** b. -ioù 1 Skarvañ ur flugezenn ouzh ar c'hroc'henn, e-maez e lec'hiadur naturel. Skarvadurioù surjaniel eo an ezforzhadoù, tra ma vez graet *fic'hoù* eus an difourkoù emdarzh (a orin poreel, kankrel pe daraezel). Arveret e vez ivez al lostger (-*ezforzhañ*). 2 Reizh benel ar ger a dalvez ez eus anv eus difourk an ezforzhañ ouzh ar c'hroc'henn.

stomisé ◇ **stomized** ◇ **ezforzheg** b. -eion Gouziviad ezforzhek, eleze o tougen un ezforzh.

stomite ◇ ◇ **dazforzhfo** g. Tanienn an difourk en un dasforzhañ, ent dibarek e par glaourgenn ar stomok en un dasforzhañ kreuz-pervez.

STPD : **conditions** ou **système** ~ ◇ **Standard Temperature Pressure Dry air** ◇ **amveziadoù** l. (g.) **Gwrezverk ha Gwask Reolat hag aer Sec'h (amveziadoù GGRS)** Doare da zitourañ un ec'honad aezhel a seller evel reolat ar gwrezverk hag ar gwask o ren ennañ (0°C ha gwask muzuliet gant an aerwaskventer leiaet eus 47 mmHg) ha ma 'z eo sec'h an aer.

strabisme ◇ **strabismus**, **heterotropia** ◇ **loakrerezh** g., **ankensteud** g. Migengerc'h an daou welahel, ul lagad o forc'hañ diouzh ar steudahel. — Gwech e vez *ezwar* al loakrerezh (gwariañ war ziavaez pe *ezwariañ*), gwech *engwar* (gwariañ war ziabarzh pe *engwariañ*), ha dibaot kaer *uswar* (gwariañ war grec'h pe *uswariañ*) pe *iswar* (gwariañ war draoñ pe *iswariañ*). Kemm a vez lakaet etre ul loakrerezh peluzel hag unan anpeluzel.

strabisme alternant ou **bilatéral** ◇ **alternating strabismus** ◇ **loakrerezh pebeilat** Loakrerezh ma c'hell pep lagad studañ diouzh an ergorenn da sellout.

strabisme concomitant ◇ **concomitant strabismus** ◇ **loakrerezh kedwar** Loakrerezh ma chom digemm derez an ankensteud pa gemm durc'hadur ar sell.

strabisme incomitant ◇ **incomitant strabismus** ◇ **loakrerezh ankedwar** Loakrerezh ma vez daskemmet derez an ankensteud pa gemm durc'hadur ar sell.

strabisme latent ◇ **latent strabismus** ◇ **loakrevezh enkelat** Loakrevezh dinoet hepken diwar-bouez stignadelloù en araez da zigevedriñ merzhout gweledel pep lagad.

strabisme monoculaire ◇ **monocular strabismus** ◇ **loakrevezh unlagadel** Loakrevezh ma 'z eo al lagad gwariet bepred an hevelep hini.

strabisme rotatoire ◇ ◇ **loakrevezh c'hwelwar** Loakrevezh dre c'hwelañ al lagad war e ahel a-saezh.

strabologie ◇ **strabismology** ◇ **ankensteudouriezh** b. Skourr a 'l lagadouriezh o plediñ gant studiañ ha prederiañ al loakrevezh.

strabomètre ◇ **strabismometer** ◇ **strabometr** g. Ardivink amkanet da vuzuliañ derez ar gwariadur el loakrevezh.

strabotomie ◇ **strabotomy** ◇ **strabotomiezh** b. Treuzlenañ surjanel un pe lies kigenn al lagad evit dereizhañ ul loakrevezh.

Strachan-Scott : syndrome de ~ ◇ **Strachan-Scott syndrome** ◇ **azoniad g. Strachan-Scott** Furm liesnervennfo arsellet e broioù trovanel 'zo, diwar un negez kemmesk tiamin ha riboflavin, moarvat.

strand ◇ **strand** ◇ **pilpouz** g. Neuz edañvennek arsellet e kalonstenerluniñ treuztreizherel war bantenn gentezel trapigosodoù mintrek 'zo, hag a c'hellfe erzerc'haat bezañs fibrin.

strangulation ◇ **strangulation** ◇ **1 tagadur g., munvac'hañ, munvac'h g. 2 tagellañ, tagelladur g.** 1 Enstrizhañ taer ar gouzoug gant an daouarn pe dre un ere startet (kordenn, lindag, h.a.), o tevoudañ peurliesañ ar marv dre an angwent. 2 Enstrizhañ ur flugezenn oc'h astaliñ an amred (sl. *étranglement*).

strangurie ◇ **stranguria** ◇ **staotell** b. Diaez an ec'hodiñ troazh, takenn ha takenn, gant laur ha tangrez ar c'hwezigeñ.

strapping ◇ **strapping** ◇ **bandenn b. beg, lurell b. beg** Diloc'hekaat diwar-bouez bandennoù peg, arveret er c'horfeunañ.

stratum ◇ **stratum** ◇ **haen** g. Pep hini eus haenoù arosodet ur gwiad bevedel, an ezkroc'hen pergen (sl. *épiderme*).

Straus : signe de ~ ◇ **Straus's sign** ◇ **arouez b. Straus** E seizi an dremm a orin kreizel, un ensinkladenn bilokarpin ne zevoud kemm c'hwezadur ebet etre daou du an dremm, tra ma 'z eo spis dale an kez c'hwezadur en tu tizhet, e seizi an dremm a orin trobarzhel.

Strauss : technique de ~ ◇ ◇ **kalvezder g. Strauss** Araezad amkanet da andalañ pad an tredanren god-kentez, diwar-bouez jedadurioù kemplezh. Diazezet eo war zelankadur, dre araez ur sont tredanfraouaat dodet er c'hentez dehou e kefin ar god, eus dreistsistolioù kentezel koublet (un dreistsistol devoudet gant ur sistol emdarzh) ha diazezet eo ivez war vuzulioù graet pa verraer tamm ha tamm an entremez a zisparti an dreistsistol devoudet diouzh ar sistol kent (sl. *sinus : maladie du* ~, *Mandel : technique de* ~ ha *Narula : test de* ~).

strep-test ◇ **strep-test** ◇ **proud g. ar strepokok** Proud o kevaraezañ, e kuzulva un embregour, da hennadiñ ur strepokok β-gwadloezus eus ar stroll A war un erlamad gargadennel. E degouezh ur proud nac'hek e ve didalvoud ur mezegadur dre ar bevastalerioù.

Streptobacillus ◇ **Streptobacillus** ◇ **Streptobacillus** Genad bakteri Gram leiel, aerat pe anaerat anret, anezhañ bazhili edañvennek pe edañvennekoc'h bodet dre chapeledoù. *Streptobacillus moniliformis* zo gwezher un derzhienn dastumet diwar brazhadoù ar razhed, anvet *terzienn Haverhill* pe *eritem arzfoel darreuziadel*.

Streptococcaceæ ◇ **Streptococcaceae** ◇ **Streptococcaceae** Kerentiad bakteri pellennek (kok) Gram +, ansporek, katalaz -, gougevret ouzh skourrad ar *Firmicutes*, oc'h erdalañ ar genoù *Streptococcus* ha *Peptostreptococcus*.

streptococcémie ◇ **streptococcemia** ◇ **strepokoklestegezh** b. Gwadlestegezh devoudet gant ar strepokok.

streptococcie ◇ **streptococcosis** ◇ **strepokokiezh** b. Nep poread diwar strepokok.

Streptococcus ◇ **Streptococcus** ◇ **Streptococcus** Genad bakteri eus kerentiad ar *Streptococcaceae*, kok Gram muiel, 1 µm treuzkiz, stalet dre zaoüdoù pe e chapeledoù. Arvevat ha/pe kleñvedus int e forzhioù analañ hag e benvegad koazhañ an den hag al loened. Er metoù agar-gwad, emaint en araez da zevoudañ gwadloezadoù a zaoü rizh kevarall : ar gwadloez β, gant loezadur klok an hemati bezant er metoù, hag al loezadur α, diglok, a reer "rizh *viridans*" anezhañ ivez; ar strepokok angwadloezus a erzod ur gwadloezañ γ. Ar strepokok a c'hell dedaoliñ lies danvezenn ezkelligel : leukokidinoù, evel ar streptolizinoù O ha S, nukleazoù ezkelligel, streptokinazoù, h.a. Rummadur ar strepokok zo kemplezh, renet diouzh ar rizh gwadloezañ a zevoudont er metoù agar-gwad, diouzh poliozid C ar speur (strolloù Lancefield) ha diouzh ar protein M eus ar speur (rizhoù). A-douez an 21 spesad gougevredet er genad, *S. agalactiae*, *S. faecalis*, *S. pneumoniae*, *S. pyogenes* ha *S. salivarius* zo dezho un deur arbennik er vezekniezh. — *S. agalactiae* : strepokok β-gwadloezus gougevret ouzh stroll B Lancefield, kiriek da argerzhioù lestel grevus gant an nevezc'haned, treuzkaset dre ar ganol c'hanadel da-geñver ar gwilioù. Devoudañ a ra bronnofoù gant ar vuoc'h. — *S. faecalis* : strepokok eus stroll D Lancefield, angwadloezus pe gant ur gwadloezañ α pe β. Un arvevad kelanat boas eus ar pervez hag eus ar forzhioù analadel uhelañ eo. Kiriek e vez a-wechoù da boreadoù troazhadel ha da enkalonnfo goulemm. Nebeut kizidik eo ouzh gwered ar bevastalerioù. — *S. pneumoniae* : strepokok hirgelc'hiek pe goafheñvel, uzennnek, stalet dre zaoüdoù. Er metoù agar-gwad e tevoud ur gwadloezañ rizh α. Anavezout a reer 80 rizh poliozidoù uzennnek, rizh an uzenn o vezañ arveret da zevverk rummañ er spesad-se. Kiriek eo da skeventfoioù ha da bilhonfoioù. — *S. pyogenes* : strepokok β-gwadloezus gougevret ouzh stroll A Lancefield. Devoudañ a ra daou rizh argerzh : 1) argerzhioù lestel er ster dik : gorankoù, tangouez, skarlegenn, limfforzho, beskoul, skouarnfo, kevfo, gwadlestegezhioù; 2) argerzhioù dianbore : remm lemm an arzoù ha bloueigfo lemm. Kizidik kenan eo ouzh ar penikilin G. — *S. salivarius* : strepokok α-gwadloezus eus ar stroll *viridans*, kelanat ar forzhioù analañ uhelañ ha

kiriek d'ur enkalonennfo goulemm. — *S. viridans* : anvad o vodañ spesadoù diseurt a strepokok (*S. sanguis*, *S. salivarius*, h.a.), o tevoudañ, evit an darn vrasañ anezho, ur gwadloezañ a rizh α , en ur metoù agar-gwad, a zo ivez evit an darn vrasañ kelanet ar forzhioù analañ uhelañ ha kiriek da 90 % eus an enkalonennfoioù goulemm.

strepto-coque ◇ **streptococcus** ◇ **strepokok g. & s.** Nep garvev gougevret ouzh ar genad *streptococcus*.

streptodiphérie ◇ ◇ **streptodiferiezh b.** Furm diferiezh ma emañ ar strepokok kevredet ouzh bazhell Loeffler.

streptodornase ◇ **streptodornase** ◇ **streptodornaz g.** Enzim borc'het gant skodoù strepokok gwadloezus 'zo, o tourrannañ dezoksiribonukleoproteinoù ar c'hraoñelloù hag o loezañ an naouezennoù linek.

streptogramine ◇ **streptogramin** ◇ **streptogramineg g. -eier** Seurtad bevastaler nes d'ar makrolideier.

streptokinase ◇ **streptokinase** ◇ **streptokinaz g.** Enzim bakteriell goubaret diouzh siladoù tiñvadur strepokok gwadloezus, en araev da loezañ ar fibrin, hag arveret, mesket alies gant ar streptodornaz, da zevoudañ loezadur kaouledennoù da-geñver trombozioù talmerel pe wazhiennel.

streptolysine ◇ **streptolysin** ◇ **streptolizin g.** Toksin gwadloezus borc'het dreist holl gant ar strepokok a 'r stroll A, daou seurtad anezho : ar streptolizin O, danvezenn broteek, antigenek, hag ar streptolizin S, hep perzhioù antigen.

Streptomyces ◇ **Streptomyces** ◇ **Streptomyces** Genad bakteri Gram +, aerat, eus kerentiad ar *Streptomycetaceae*. An deour bras o deus er vezekniezh zo hennezh : lies spesad a zedaol bevastalerioù pouezus (streptomikine, kanamikine, linkomikine, tetrakiklinoù, rifamikine, h.a.). Kleñvedus evit an den eo spesadoù 'zo.

Streptomycetaceae ◇ **Streptomycetaceae** ◇ **Streptomycetaceae** Kerentiad bakteri eus urzhad an Actinomycetales, oc'h erdalañ ar genad *Streptomyces*.

streptomycine ◇ **streptomycin** ◇ **streptomikine g.** Bevastaler eus kerentiad an aminoglikozid, gounezet diwar *Streptomyces griseus*. Bazez eo hag arveret e vez e rezh sulfat pe halioù bevel all. Bakterilazh eo, gweredus war ar bazhilli Gram + ha Gram -. Arveret e vez dreist holl dre an hent enkaherel, e mezegadur an dorzhellegezh (kevredet gant eneptorzheleier all), en enkalonennfo bakteriell diwar *strepokok viridans* hag an enterokok, e mezegadur ar vosen, ar brukelloz (a-ser gant ar c'hiklinoù), hag erziwezh dre ar genoù evel dilester pervezel. Ar streptomikine a anad bezañ pistrius evit an nervenn gempouez-keved, ent dibarek ar skourr rakkambrel anezhi.

streptothricose ◇ **streptothricosis** ◇ **streptotrikoz g.** 1 Anaf kroc'hen dibarek da spesadoù loenel 'zo diwar un aktinomiket, an *Dermatophilus congolensis*. 2 Anv roet gwechall d'an aktinomikoz.

Streptothrix ◇ **Streptothrix** ◇ **Streptothrix** Genad bakteri andarbennet evit ar mare, ar darn vrasañ eus ar spesadoù anezhañ o vezañ rummet bremañ e-touez an *Aktinomiket*.

stress ◇ **stress** ◇ **stres g.** Teskad an erzezhioù bevedel ha bredel delanket er bevedeg, pa rank talañ a greiz holl ouzh ur gougorzh, diforzh e natur, plijus pe displejus.

stri-

• *présentant une striation transversale* warni ur rizennadur treuz • *fibre musculaire striée* gwienn gaher rizennek • *sarcomères qui lui confèrent l'aspect strié observé sous le microscope* sarkomeroù oc'h anadiñ e rezh rizennoù dindan ar c'horrgraker • *entouré d'un muscle strié* gronnet gant ur gigenn rizennek • *aire striée* leur rizennek • *corps strié, striatum* rizennek • *selles muqueuses souvent striées de sang* oulennoù glaourek alies gant strilhoù gwad • *stries de grattage, striatum* rizennoù skrañ.

striction ou **stricture** ◇ **stricture** ◇ **tag g.** War an hevelep sterva e kaver ivez *isvoll, enkadur, strishadur, strishaenn, strizhenn*. Un *tag* zo un isvoll, ur strishadur kleñvedel eus un organ, da skouer er c'herienn *gwalenn dag* Gl. *anneau de striction* arveret evit ar stomok, an treizer, ar c'halc'h, h.a.

stricturotomie ◇ **stricturotomy** ◇ **tagenbenañ** Didagellañ, enbenañ ur strishadur, ur walenn dag.

stridor des nouveau-nés ◇ **congenital stridor** ◇ **stridor g. an nevezc'hanidi** Anaev kuñv an nevezc'hanidi, naouus dre un trouz gwic'hus, arreataet da bep fiñv analañ, diwar un namm eus ar c'harloc'henn. Deskrivañ a reer ur *stridor ganedigel* devoudet gant usteñv an toazon (sl. *laryngomalacie*).

stridoreux ou **striduleux** ◇ **stridulous** ◇ **gwic'hus aa.** A-zivout trouzioù analadel 'zo, yudus, skiltr, a c'hoarvez er c'harloc'henn hag er briant (sutad garloc'henn-briant).

striés : **syndromes** ~ ◇ **striatal syndromes** ◇ **azoniadoù l. (g.) rizennegel** Teskad azoniadoù e dalc'h daralladur ar rizennek. Digemmañ a ra Lhermitte : ur *azoniad rizennegel-pallidel*; un *azoniad rizennegel* o klotañ ouzh un anaf eus ar *gronn lostek* hag eus ar *glosenn* (korea Huntington, azoniad C. hag O. Vogt, andagoù gweañ); un *azoniad pallidel* (sl. *noyaux basaux*).

stries angioïdes de la rétine ◇ **angioïd streaks in the retina** ◇ **skarrou l. (g.) angioïdel al luc'hsae** (sl. *angioïdes* : *stries ~ de la rétine*).

striopallidal ◇ **striatopallidal** ◇ **rizennegel-pallidel aa.** A-zave d'ar c'horf rizennek en e bezh : rizennegel ha boullenn c'hlas. — *azoniad rizennegel-pallidel* : teskad azonoù e dalc'h daralladur ar rizennek; erzerc'haat a ra ent klinikel dre gleñved Wilson (sl. *avujo familhel ar yaouerion gant dic'henezhadur ar rizennegel, kleñved Wilson* Gl. *hépatite familiale juvénile avec dégénérescence du corps strié, maladie de Wilson*) pe, mard eo bevennet an anafoù, dre un instant, ul ledkorea, un andasfiñv pe c'hoazh dre un azoniad gaouhirvelel e degouezh anafoù daoudu.

strobile ◇ **strobila** ◇ **strobil g.** Korf an tenia, amparet gant gwalennoù (proglotizoù).

stroboscopie ◇ **stroboscopy** ◇ **punellat, stroboskopiezh** b. Hentenn imboure'h ar c'harloc'henn o kevaraezañ niveriñ niver froumadou ar plegoù mouezh. Ur c'heflusker tredan a laka da c'hweldreiñ dirak lagad an imboure'her ur stanker a astal ar gweled a entremeziou reoliek. Plegoù ar vouezh a hañval bezañ difiñv pa 'z eo par talm ar stanker ha hini ar plegoù mouezh.

stroma ◇ **stroma** ◇ **stroma** g. Anneuenn pe gebradur un organ, ur wagrenn pe ur yoc'henn, amparet gant ur gwiad kenglenel gwazhiedet, a dalvez da c'housskor d'un elfennoù kelligel; da vezañ digemmet diouzh ar parenkim, ar gwiad arc'hwelel.

strongle géant ◇ **Eustrongylus gigas** ◇ **strongil s. keurel** Preñv eus an urzhad Nematod, arvevad o trigañ e louezh ar c'hañvedeged, o tizhout an den ent nemedennek.

Strongyloides ◇ **Strongyloides** ◇ **Strongiloid** Genad Nemathelminth gougevret ouzh kerentiad ar Rabbidideged, a zo ur spesad anezho, *S. stercoralis*, preñved bihan kranennek 1-2 mm hed, arvevaded o trigañ e speur ar pervez. O c'havout a reer er broioù tomm hag ivez en Europa, er broioù mengleuzel; an dasparzh douaregorel anezho zo heñvel ouzh hini an ankilostom hag an nekator.

strophulus ◇ **strophulus** ◇ **strofuluz** g. Dermatiz ar vugale naouus dre an dispuilhad eus krugennoù bihan damroz, debroun, o tredeñ dre resmiadoù, kevredet alies gant strafuilhoù koazhadel.

struct-

- *substance de structure voisine* de danvezenn nes dre he luniad da
- *dépourvu de structures cellulaires* hep luniadezh kelligel
- *qui s'écarte de la normalité par sa structure, son siège, son fonctionnement* o forc'hiñ diouzh ar reolled dre e luniad, e sez, e arc'hwelerezh
- *altérations des structures cellulaires* daralladurioù e luniadurioù ar c'helligoù
- *structure chimique apparentée à celle de l'amphétamine* luniad kimiek kerentiet da hini an amfetamin
- *d'architecture tubuleuse ou cordonale* pibellek pe funellek e adeiladezh
- *la structure ganglionnaire* luniadezh ar gwerblennoù
- *structure histologique* luniadezh wiadel
- *étudier les structures moléculaires* imboure'hiñ al luniadoù molekulel
- *structure anatomique* luniad korfadurel
- *ensemble des structures internes par l'intermédiaire desquelles l'Ordre des Médecins accomplit sa mission* teskad ar frammoù diabarzh ma kefleugn Urzh ar vezeion he c'hefridi
- *immunologie structurale* hangaoneiezh luniadel.

strumectomie ◇ **strumectomy** ◇ **pennsac'hezvenañ** Dazbidañ darnel pe hollel ur pennsac'h.

strume post-branchiale ◇ **struma postbranchialis** ◇ **pennsac'h g. drekbrenkel** Yoc'henn ar skoedenn dibaot kenan, a zedro yud, oc'h ober un eilad eus luniad ar ganol drekbrenkel, evodet eus rannbarzh a-dor ar pempet boulc'h brenkel.

strumite ◇ **strumitis** ◇ **pennsac'hfo** g. Skoedennfo henek gant neuz ur pennsac'h strewek.

Strümpell : phénomène de ~ ◇ **Strümpell's phenomenon** ◇ **anadenn** b. **Strümpell** Fiñv andiarvenn plegañ a-gil ha pellaat an troad, a-gevret gant plegañ diarvenn ar glin, en ervez da vezañ arsellet e-kerz tizhadoù 'zo ar forzh pikernennek.

strychnine ◇ **strychnine** ◇ **striknin** g. Alkaloid strinkennek, pistriek kenan, douhennet eus greun ar (*Strychnos nux vomica* (kraoñ vomikez)) pe danzeet ent kevanaozel. Arveret e vez en aozadoù disrazhediñ 'zo. Un doenad 30 mg a c'hell devoudañ marv un den.

strychnisme ◇ **strychnism** ◇ **strikninegezh** b. Pistriadur gant ar striknin.

Stryker-Halbeisen : syndrome de ~ ◇ **Stryker-Halbeisen syndrome** ◇ **azoniad g. Stryker-Halbeisen** Kroc'henanaez lec'hiet war ar gouzoug, war an dremm ha war barzh uhelañ ar bruski, kevredet gant un amwad makrokitel. Rouestlad un avitaminoz B eo.

stupéfiant ◇ **stupefacient, narcotic** ◇ **1 badus** aa., **bader** aa. **2 bader** g. **-ioù** 1 Gant gweredoù hezus, dic'hostus, morzus ha hevredus, o tec'han arsoc'h hag estoue gant an amzer. 2 Danvezenn, dram bader. E rumm ar baderioù emañ an opiom, ar morfîn, an heroin, ar c'hodein, ar c'hanab indian, h.a.

stupeur ◇ **stupor** ◇ **malouen** g. Stad a zarvigad eus ar bersonelezh o naouiñ dre un daralladur darnel eus ar genskiant gant un isloc'hadegezh, leiadur an erwezhiou ouzh ar c'hentrigennoù diseurt. Arsellet e vez e furmoù grevus an derzhienn tifoidel, er gouvid melankolek, er gatatoniezh hag en azoniadoù an arluz.

stuporeux ◇ **stuporous** ◇ **1 malouenek** aa. **2 malouenel** aa. **3 maloueneg** g. **-eion** 1 A-zivout ur gouziviad en ur stad a valouen. 2 A-zivout ar malouen, da skouer ar *velankoliezh valouenel* Gl. *mélancolie stuporeuse*. 3 Gouziviad malouenek.

Sturge-Weber-Krabbe : maladie de ~ ◇ **Sturge-Weber-Krabbe disease** ◇ **kleñved g. Sturge-Weber-Krabbe** Kevredet un angiom o sezañ e tiriad an nervenn drigevell, strafuilhoù lagadel ha strafuilhoù nerval a-zalc'h gant un angiom empenn. Ur fakomatoz eo.

Stüve-Wiedemann : syndrome de ~ ◇ **Stüve-Wiedemann syndrome** ◇ **azoniad g. Stüve-Wiedemann** Azoniad lieskammneuziadel trankus. Seurtad miwe an eskern ganedigel, naouus dre ur savder bihan, un argrommed c'hanedigel eus an eskern hir hag ur bizplegad.

stylalgie ◇ **styloid dysphagia** ◇ **stilhonost** b. Azoniad laurus ar c'hargadenn diwar amwaskadur an nervenn deod-gargadenn gant ur stilhon a 'n askorn ividig re hir.

stylet ◇ **probe** ◇ **goustilh** g. Garenn vetal bihan, a-wechoù ur c'hrao en he fenn hag ar penn all, bazhoulek pe e stumm un nozelenn pe ur forc'h.

styloïdectomie ◇ ◇ **stilhonezvenañ** Dazbidañ stilhon an askorn ividig.

- stylo injecteur** ◇ **pen injector** ◇ **stilh g. ensinklañ** Doare arnevez da arbarañ danvezennoù ensinkladus diseurt (insulin : *stilh insulin*; adrenalin). Adkargadus pe unarver e c'hell bezañ.
- styloradial** ◇ **stylo-radial** ◇ **˜stilhon ar werzhid**; **stilhongwerzhidel** aa. A-zivout stilhon ar werzhid.
- styptique** ◇ **styptic** ◇ **1 ˜gwadastalañ, gwadastaler** aa. **2 gwadastaler g. -ioù** 1 Gant perzhioù krezus ha gwadkaeüs. 2 Lia gwadastaler, lec'hiek alies, arveret diwar-bouez ur stilh gwadastalañ, da skouer, pe c'hoazh un tapon kotoñs gwadastaler.
- subaigu** ◇ **subacute** ◇ **goulemm** aa. O tedreiñ etre ur furn lemm hag ur furn henek.
- subconscient, subconscious** ◇ **subconscious, subconsciousness** ◇ **isemouez aa. & g., isemouezañ** Termen arveret er vredennoù da arouezañ pezh a zo pe nebeut emouez (gouemouez) pe dindan dreuzoù an emouezañ gweredel pe zoken diziraez dezhañ (danemouez). Boaziet gant Freud en e skridoù kentañ evel kenster da ziemouez, e voe dilezet dizale en askont eus e forc'hellegezh³.
- subdélire** ou **subdelirium** ◇ **subdelirium** ◇ **gouambren** b. Ambren kuñv ha sioul oc'h erzerc'haat dre gomzoù dislenadec, distaget a vouezh izel, dre ar c'hask eus un draezenn faltaziek, h. a., na vir ket avat ouzh ar c'hlañvour a respont d'ar goulennoù graet dezhañ.
- subépendymome** ◇ **subependymoma** ◇ **endanependimom** g. Astrokitom endan-ependim, seurtad ependimom dinodet diouzh kelligoù endanependimel, en ervez da ziforc'hekaat e kelligoù ependimel pe en astrokit.
- subérose** ◇ **suberosis** ◇ **suberöz** g. Skeventad hangaeel diwar zewentañ uzor skorj, ar gwezher o vezañ ar *Penicillium frequentans*.
- subfébrile** ◇ **subfebrile** ◇ **gouwresterek** aa., **gouderzhiennek** aa. En ur stad naouus dre ur gwrezverk uheloc'hik eget ar vonanded, eleze na zistremen ket 38 °C.
- subfébrilité** ◇ **subfebrile state** ◇ **gouwrester g., gouderzhienn** b. Terzhienn, gwrester skañv gavalet etre 37.1 °C ha 37.8 °C (Mester) ha hirbad. Arsellet e vez e kleñvedoù hollek 'zo (torzhellegezh) hag anaezioù lec'hiek 'zo (strafuilhoù koazhadel, divilhennfo henek, anaezioù lestel genoù-gargadenn, skoedusvorc'h, h.a.).
- subglossite diphtéroïde** ◇ **Cardarelli's aphthae** ◇ **endandeodfo g. difteroidel** Yoc'henn vihan graspet endan-deod sezet e-par poell an teod, devoudet gant taravoù ar rakdent traoñ, arsellet gant ar vugale tizhet gant ar paz, ne vern pehini an arbenn. Paot eo gant an drev pergen.
- subictère** ◇ **subicterus** ◇ **gouikter** g. Ikter skañv (sl. *ictère, jaunisse*).
- subictérique** ◇ **subicteric** ◇ **gouikterek** aa. Gant ul livrezh arvelen, etre al livrezh bonan hag an hini melen naouus d'an ikter fraezh.
- subinçant** ◇ **subinçant** ◇ **kevarlank** aa. A-zivout un aroad naouus dre varradoù pe c'hrezvarroù o tont lerc'h-ouzh-lerc'h, hep didorrevzh ebet (sl. *état de mal*).
- subinvolution de l'utérus** ◇ **subinvolution of uterus** ◇ **gouatreñ ar grozh** Usvent ar grozh o trebadout goude an dian-wilioud.
- subjectif** ◇ **subjective** ◇ **1 dangorel** aa. **2 dangorek** aa. 1 A-zivout an devoùoù ditouret gant ar gouziviad, a-gevenep d'an traoù enno o unan pe d'an devoùoù stadet gant ar mezeg e unan (*ergorel*). 2 Gant an damant da zispartiañ pezh a denn d'ar seller diouzh ar pezh a denn d'an traoù sellet.
- sublétal, sublétal** ◇ **subléthal** ◇ **goudrankus, gouvarvus** aa. A-zivout doead un danvezenn bistriek bihanoc'h un disterañ eget an doead marvus.
- subleucémie** ◇ ◇ **gouleukemiezh** b. Seurtad leukemiezh gant un elwenn leiek, tra ma chom ar gwennrestrad naouus d'an anaez leukemek.
- sublingual** ◇ **sublingual** ◇ **endan-deod** aa. O sezañ pe o tinodiñ dindan an teod, da skouer *tagos endan-deod, gwagrenn endan-deod, fibrom endan-deod*.
- subluxation** ◇ **subluxation** ◇ **gouzisvellad** aa. Disvellad darnel pe leiek.
- submandibulaire** ◇ **submandibular** ◇ **endan-c'haved** aa. Lec'hiet dindan ar c'haved. — *gwagrenn endan-c'haved* : gwagrenn halviñ daoudañv, lec'hiet etre tal diabarzh ar c'haved ha tal kostezel diaz an teod. Ar san degorzhañ anezhi a vez anvet *san endan-c'haved*, lec'hiet e-kichen poell an teod.
- submatité** ◇ **slight dullness** ◇ **goudrommder** g. Leiadur darnel an heklevested reol merzhet pa giziaataer.
- submersion** ◇ **drowning** ◇ **sozadur** g. Stad ar c'horf o vezañ soubet en e bezh pe an aerforzhioù uhelañ o splujañ en ul liñvenn, marvus dre angwentañ.
- subnarcose** ◇ **subnarcosis** ◇ **kimivorzañ** Stad kalvezadel nes d'an hun, dre ziounit huneiadoù, arveret evel araez imbourc'h bredel pe vredelfennadel.
- subréfectivité** ◇ **hyporeflexia** ◇ **isdamoug** g. Leiadur dillo an damougoù.
- substrat** ◇ **substrate** ◇ **dindanad** g. Danvezenn a wered un enzim warni, o kevaraezañ an treuzfurmadur kimiek anezhi.

³Guy Étienne, *Geriadur ar Bredelfennerezh*, Preder, 1983.

- succédané** ◇ **1 succedaneous 2 succedaneum** ◇ **1 erlec'hiat** aa. **2 erlec'hiad** g. 1 A-zivout ul lia, ur gwezher arveret e-lec'h unan all, gant an hevelep perzhioù. Gwezher, lia erlec'hiat.
- succinylcholine** ◇ **succinylcholine chloride** ◇ **kloridenn** b. **suksametoniom** pe **kloridenn suksinilkolin** pe **suksinilkolin** g. Darlaosker kahelel engwazhiennel hag enkahelel, divleinekaus, renket e-touez al leptokurarioù.
- succulent** ◇ **succulent** ◇ **chugonus** aa. A-zivout un organ pe ur gwiad koeñvennek e dianlen un ensiladur gouliñv pe limf (sl. *main succulente*).
- succussion** ◇ **succussion** ◇ **krehellañ** Goulankañ hejadenoù. — **k. hipokratek** (Gl. *succussion hippocratique*, Sz. *hippocratic succussion sound*) : mod imbourc'h ar brusk, anezhañ hejañ divskoaz ur gouziviad, en ur selaouennañ e vruched, evit deznaouiñ ur bruskdour- pe ur brusklinaezhad. E degouezh ar bruskdouraezhad e klevet un trouz saflik rizhek (sl. *flot : bruit de ~*).
- sucre** ◇ **sugar** ◇ **sukr** g. -où, **sukrenn** b. Er yezh voutin e talvez *sukr* kement ha sakaroz ha, ledanoc'h, glukid (an heterozidoù lakaet er-maez). An eil termen — *sukrenn* — a arverer evit ober anv eus an oziou (sukrennoù eeun) hag eus an holozidoù ha poliozidoù, amparet gant oziou nemetken.
- sudamina** ◇ **sudamina** ◇ **sudamina** g. Anaf kroc'hen, naouus dre furmadur c'hwezigennoù bihan kenan, treuzwelus, hep ruzder an amwiskadoù hag o tarvezout goude c'hweziñ a-fonn.
- sudation** ◇ **sudation** ◇ **1 c'hweziñ, c'hwezadur** g. **2 c'hwezparañ** 1 Borc'hañ c'hwez, a-wechoù dec'honet en un amkan yac'hadel. 2 Paridigezh ar c'hwez gant ar gwagrennoù c'hwezparañ.
- Sudeck : atrophie ou maladie de ~** ◇ **Sudeck's atrophy or disease** ◇ **isteñv** g. pe **kleñved** g. **Sudeck** Askornrouezad diandaraez setez en daouarn hag en treid pergen, kevredet gant laurioù, strafuilhoù hollek hag ur gouliñv lec'hiek (sl. *ostéoporse algique post-traumatique*).
- sudoripare** ◇ **sudoriparous** ◇ **1 c'hwezpar** aa., **~c'hwezparañ 2 c'hwezparadel** aa. 1 O vorc'hañ ar c'hwez (da skouer : *gwagrennoù c'hwezpar, gwagrennoù c'hwezparañ*) pe o saniañ ar c'hwez (da skouer : *savnigoù c'hwezpar*). 2 A-zivout ar c'hwezparañ (da skouer : *kistoù c'hwezparadel*).
- suette** ◇ **sweating sickness** ◇ **1 c'hwezenn** b. **saoz 2 c'hwezenn vilier, c'hwezenn pikardat, terzhienn** b. **vilier** 1 Pore darzezius kozh, naouus dre un derzhienn uhel, c'hwezennoù puilhkek hag ur feur marvusted uhel, darvezet e Saoz er 15th ha 16th kantved. 2 Ar *c'hwezenn vilier* pe *terzhienn vilier*, dre ma oa kevredet gant c'hwezigennoù munut a vent gant greun mell, darvezet e Pikardia etre 1718 ha 1906. Dianav eo he arbenn.
- sueur** ◇ **sweat** ◇ **c'hwez** g. Liñvenn dourek, dibarek he c'hwezh, borc'het gant ar gwagrennoù c'hwezpar gorrevorc'hat hag enborc'hat ha dinaouet dre ar savnigoù c'hwezpar war c'horre ar c'hroc'hen. Enni ez eus halioù, kloridenn natriom dreist holl, druzennoù, trenkennoù drez, louc'hadoù albumin, urea ha kediadoù all. Trenkek pe vazek eo ar c'hwez, hervez arbenn ar c'hweziñ.
- sueur : test de la ~** ◇ **sweat test** ◇ **prouad** g. **ar c'hwez** Prouad arveret evit deznaou ar mukoviskidiz, anezhañ dezventañ bec'h ar gloridenn natriom er c'hwez, rak ar c'hwezvec'h klor a gresk kalz er mukoviskidiz.
- suffocation** ◇ **suffocation** ◇ **migañ** Furm angwent treloc'hel devoudet dre stankadur ar forzhioù analañ (ebarzhadur korfoù estren er c'hargadenn pe er vriant, gouliñv, bezañs borc'hadennoù puilh, lonkadur ezreol ar c'hir boued) pe dre steviadur an igorennoù analañ (migañ dremmel darvoudel pe koulel). Devoudañ a ra ur c'holl herrek eus ar genskiant.
- suffusion** ◇ **suffusion** ◇ **fennad** g. Ensiladur liñvennoù bevel (gwad, levrutzennoù) er c'havennoù entremezel, gwadliñv gant ensiladur ar gwiadoù.
- suggestibilité** ◇ **suggestibility** ◇ **hec'houdro** g. An aes eo d'ur gouzrec'h plegañ da zivizoù un teoger hag, en ur ster ledanoc'h e-maez a nep teogiñ, d'al levezonoù bredel pe gefredel.
- suggestion** ◇ **suggestion** ◇ **1 goudreiñ 2 goudroadur** g. 1 Embreg an teoger war an teoged hag, en ur ster ledanoc'h e-maez a nep teogiñ, silañ e bred un den, ur mennoz pe ur gredenn n'en deus ket, pe d'e lakaat da zegemer un tuadur nad eo ket e hini. Bez' ez eus ivez un *emc'houdreiñ* (Gl. Sz. *autosuggestion*), anezhañ emlevezonañ war ur mennoz hep soliañ war estreget ar mennoz unan. 2 Stad sentidigezh an teoged.
- sugillation** ◇ **suggilation** ◇ **1 gouvrouduenn** b. **2 brondud** g. **goudemarvel** 1 Brondudenn groc'hen skañv. 2 sl. *lividité cadavérique, ecchymose cadavérique*.
- suicide** ◇ **suicide** ◇ **emlazhañ, emlazh** g. Emlakaat d'ar marv (sl. *autolyse, suicide*).
- sulciforme** ◇ **sulciform** ◇ **nantek** aa. E stumm un nant. — **graspad n.** (Gl. *erosion sulciforme*) : anaf dentel, anezhañ ur c'haran linennek kleuziet er gurunenn, o heuliañ un treug a-zremm (sifiliz ganediget).
- sulfamide** ◇ **sulfonamide** ◇ **sulfamid** g. Anv genadel ar c'hediadoù deveret diouzh ar sulfanilamid, enno ar stroll SO₂NH₂. Reoù 'zo zo dezho ur gwered bakteriharz ouzh ar garvevion Gram mui (strepokok, pneumokok) ha Gram lei (meningokok, gonokok, *Escherichia coli*). Arveret evit mezegañ poreadoù bakteriel diseurt, kemm zo etrezo e-keñver perzhioù, sugadusted, kennevid, degorzh hag ivez evit a sell an erzerc'hadoù pistriel anezho. Sulfamidoù all zo troazhusvorc'herioù pe enepdiabeteier.
- sulfamides antibiétiques** ou **hypoglycémiantes** ◇ **hypoglycaemic sulfonamide** ◇ **sulfamidoù enepdiabet** pe **glukoz-wadisvec'huis** Sulfamidoù o fraouat borc'hadur an insulin gant an ilgreiz, anezho deveradur ar sulfonilurea evit an darn vrasañ anezho. A-ser gant ar metformin, ar glinidoù, ar glitazonoù hag an akarboz e vezont diounezet evit prederiañ an diabet c'hwek a rihz 2.

sulfamides diurétiques ◇ **diuretic sulfonamide** ◇ **sulfamidoù troazhusorc'h**us Sulfamidoù o vuiaat degorzh an troazh o werediñ e lies live an duellenn droazh, anezho an troazhusorc'herioù tiazidek hag ar re antiazidek. Ar re gentañ zo ur c'horvell benzotiadiazin oc'h amparañ luniad o molekul.

sulfatidose ◇ **sulfatidosis** ◇ **sulfatidoz** g. Seurtad lipoidoz naouus dre hogennadur sulfatidoù (sl. *Scholz-Greenfield : maladie de ~*).

sulfhémoglobine ◇ **sulphaemoglobin** ◇ **sulfhemoglobin** g. Kediad an hemoglobin gant ar sulfidenn hidrogen (H_2S) ha gant an oksigen, a liv glas olivez. Ar vezañs anezhañ er gwad (*sulfhemoglobinegezh*) a vez marvus alies, en arbenn eus an aneiltrousted anezhañ, e-doug ar pistriadurioù gant ar sulfidenn hidrogen.

sulfhémoglobininémie ◇ **sulphaemoglobinaemia** ◇ **sulfhemoglobinegezh** b. Bezañs sulfhemoglobin er gwad o tevoudañ darvoudoù leteñvel ouzh re ar gwadusvec'h methemoglobin.

sulfhydrisme ◇ **hydrogen sulfide poisoning** ◇ **sulfhidregezh** b. Pistriadur dre zewentañ burezhioù sulfidenn hidrogen, mesket alies gant burezhioù all : ammoniak, dioksidenn garbon, trenkenn nitrus (poullou blezañ, kanioù distrouilh). — Ar s. *lemm* (Gl. s. *aigu*) a erzerc'h en un doare saezhus (plom an divlezerion), dre goll anaoudegezh kevret gant un nebeut glizi; mard eo defraouet ar gouziviad e vir pellik a-walc'h un amvoustr argreuzel hag ur c'hlopennad. — Ar s. *henek* pe s. *gorrek* : dibaotoc'h, kevredet gant ur c'hlopennad garv hag amwaskus, gant morvor, boudinelloù, maeloù ar forzhioù analañ ha koazhañ; emañ en ervez da zisoc'h gant ar falezhe pe gant an ikter grevus.

sulfocarbonisme ◇ **carbonyl sulfide poisoning** ◇ **sulfokarbonegezh** b. Pistriadur micherel dre zewentañ burezhioù sulfidenn garbon ($S=C=S$).

sulfone ◇ **sulfone** ◇ **sulfon** g. Anv hollek ar c'hediadoù en o molekul ar stroll SO_2 ha daou vonad karbonek ($R-SO_2-R'$). Mard eo R' ar bonad amid (NH_2) e vez graet *sulfamid* eus ar c'hediad.

sumatriptan ◇ **sumatriptan** ◇ **sumatriptan** g. Gwazhiedstrishaer o werediñ war buzerioù serotonin gwazhied ar pilhon, gwemzh ouzh ar gernad.

SUNCT : syndrome ~ ◇ **SUNCT syndrome** ◇ **azoniad** g. **SUNCT** Gwreskanv saoznek evit *Short-lasting Unilateral Neuralgiform headache attacks with Conjunctival injection and Tearing*. Seurtad dremmost dibaot kenan, anezhi barradoù berbad arreat kloppennad untu, kevret gant darwazh ar c'hevresaeoù ha daeraouiñ. Kilvers ouzh ar prederiadur mezege, a-zalc'h gant un anaf enkloupenne e vez a-wechoù.

superantigène ◇ **superantigen** ◇ **gourantigen** g. Molekul a orin bakteriel pe viruzel en araez da fraouaat ar c'helligoù T ent dizalc'h diouzh ar spesadelezh antigenek anezho. Lenañ a ra an kez molekul ouzh parzh diavaez ar molekul HLA a 'r c' 'hlas II, en araez neuze da erwezhañ ouzh parzh diavaez buzerioù T 'zo evit an antigen (TCR, gwreskanv ar *Sz. T cell receptor*). Al lenadur a zevoud enniñv an holl limfokit T o tougen an kez TCR hag usorc'h IL2 (interleukin 2). Toksinoù proteek eo ar gourantigenoù, kiriek da bistriboreadoù bouedel ha, dre hantererezh borc'hadur uhel kitokin, da vleuzioù pistriel.

superfamille ◇ **superfamily** ◇ **uskerentiad** g. Teskad kerentiadoù boutin kenetrezo un unrezhded kemalad oc'h amplegañ un orin hendadel boutin.

superfécondation ◇ **superfecundation** ◇ **elsperiañ** Spertiañ div pe lies vigellig e-doug an un keventrac'h pe keventrac'hoù kenheuilh e-pad an un prantad vic'hadiñ.

superfétation ◇ **superfetation** ◇ **uefrouezhigiñ** Digemmañ a reer an *elsperiañ* diouzh an *uefrouezhigiñ* evel henn : en degouezh kentañ ez eus un pe lies vigellig frouezhiget gant spergelligoù kevarall e-pad an *un prantad vic'hadiñ*, tra ma c'hoarvez en eil degouezh, goude frouezhigadur ur vigellig ha furmadur ur grouell er grozh, frouezhigadur ur vigellig all e-doug ur c'hor mizaouel all. Dibaot kaer eo an anadenn-se.

superfusion néphronique : syndrome de ~ ◇ ◇ **azoniad** g. **an userfenn nefronek** Azoniad naouus dre vuiaadur erfenn bloueigoù al lounezh ha muiadur arc'hwel ar pibelloù, arsellet el lounezhiswe daoudou gant nefronisriñv.

superinfection ou **surinfection** ◇ **superinfection** ◇ **dreistporeañ ; dreistporead** g. Poread o tarvezout e-doug ur pore diwar ur gwezher kleñvedus diforc'h diouzh an hini en deus devoudet an kez pore.

superoxyde dismutase ◇ **superoxide dismutase** ◇ **dismutaz** g. **superoksidenn ; SOD** g. Metalloenzim endeuat enaozet en holl gelligoù aerat. Treluskañ a ra diheladur an anion superoksidenn en oksigen ha peroksidenn hidrogen. Angemeret e vez evel ar gentañ linenn difenn enep ar bonadoù oksigenek rez.

supination ◇ **supination** ◇ **1 palvsaviñ ; palsav** g. **2 drekgourvez** g. 1 Fiñv an arvrerc'h o lakaat an dorn da c'hweldreiñ eus an tu diabarzh war an tu diavaez, eleze treiñ palv an dorn war-du an nec'h, ar *palsav* o vezañ ar savlec'h disoc'h. 2 sl. *décubitus*.

suppositoire ◇ **suppository** ◇ **kilhenn** b. Angevezh apotikel, sonn ar c'hantalc'h anezhañ, kernennek pe viheñvel ar stumm anezhañ, a ebarzher er youlc'h, pe evit aesaat ar c'harzhadurioù, pe evit lakaat ul lia da vezañ suget.

suppuration ◇ **suppuration** ◇ **linañ ; linadur** g. Furmidigezh lin.

supraduction ◇ **supraduction** ◇ **krec'hduañ** Fiñv gorren al lagad.

supramastite ◇ **supramammary abscess** ◇ **rakvronnfo** g. Morfer a-vas ar vronn, eleze o tinodiñ dirak gwagrenn ar vronn, er c'hroc'hen pe er gwiad kellaouek endan-groc'hen.

suprasellaire ◇ **suprasellar** ◇ **us-dibr** aa., **usdibrel** aa. Lec'hiet a-us d'an dibr turkek.

supraventriculaire ◇ **supraventricular** ◇ **us-kofig, uskofigel** aa. A-zave d'ur rannbarzh eus ar galon lec'hiet a-us d'ar c'hofigoù, ent dibarek a-zivout kalonusteadoù pe migorvezioù a zo an orin anezho e par an hordenn gantez-kofig pe lec'hiet a-us.

suraigu ◇ **superacute** ◇ **gourlemm** aa. Lemm kenan, a-zivout azonoù, kleñvedoù pe poreadoù.

sural ◇ **sural** ◇ **˘ar c'hof gar**; **˘kof gar** A-zave d'ar c'hof gar.

suralimentation ◇ **superalimentation** ◇ **usvagañ**; **usvag g.**; **usvagadur g.** Euvradur kementadoù boued reñverek, arbenn paot ar borrdor. Ur fazi yec'hedouriezh e vez ar peurliesañ, met a-wechoù e c'hell bezañ lodek e prederiadur kleñvedoù 'zo.

surcompensation ◇ **dreistkempouezañ** Argerzh bred ma teu a-benn drezañ ur gouzrec'h tizhet gant un divig pe un namm d' en em zizober anezhañ hag ouzhpenn se da erlec'hiañ ur perzh outañ.

surdimité ◇ **surdimitism** ◇ **bouzarmuderezh g.** Dic'halloud da gomz dianlenat d'ur vouzarded c'hanedigal pe arzeuat, e-kerz bloavezhioù kentañ ar vuhez (a-raok an oad a 8 vloaz).

surdité ◇ **deafness, surdity** ◇ **bouzarded b.**; **bouzarder g.** Leiadur (isklev) pe koll klok (anklev) ar c'hleved. An termen kentañ a verk ar stad, kuit a venegiñ an arbenn, tra ma ra dave an eil termen d'ur c'hleñved resis : ar *bouzarder kreizel* (Gl. s. *centrale*) diwar un anaf eus kreizennoù kleved an empenn; ar *bouzarder dec'havael* (Gl. s. *de perception*) diwar un anaf eus an nervenn gempouez-kleved pe ar *bouzarder treuzkas* (Gl. s. *de transmission*) diwar un anaf eus ar skouarn greñn (taboulin, korzenn glevedel, ristenn eskernigoù ar c'hleved), an hini nemetañ pareadus dre ar surjianerezh (sl. ivez *Ménière* : *maladie pe syndrome de ~*; *amusie réceptive, amusie sensorielle, surdité musicale; audimité de compréhension, agnosie auditive verbale congénitale, surdité verbale congénitale*).

surdose ◇ **overdose** ◇ **gourdoenad g.** Pistriadur lemm dre ur c'hementad reñverek eus an dram boaziet gant ar c'haezhiad.

surface mitrale ◇ **area of the mitral orifice** ◇ **gorread g. mintrek** Gorread ar gwask kentez-kofig (mintrek) dewerzhet e cm², ent reol eus 4 da 6 cm² gant an oadour (sl. *Gorlin* : *formule de ~*).

surfactant ◇ **surfactant** ◇ **gourlifr g.** Danvezenn borc'het er skevent en araez da leiaat an tennder gorre el logigoù skevent ha da gevaraezañ ec'honusted ar skevent da-geñver ar fiñvoù analañ. Ar c'hementadinañ anezhañ el liñvenn amnionel a gevaraez andalañ azved skevent ar grouell.

surjet ◇ **running or continuous suture** ◇ **sourjelliñ**; **sourjell b.** Krafaelañ diwar-bouez un neudenn unel tremenet a-bep eil dre an div vriell eus ar gouli a-geñstok, hep skoulm etre, startaet dre zaou skoulm en daou benn a 'r gouli.

surmenage ◇ **overstrain** ◇ **regas**; **regas g.** Derez skuizhnez ezreol diwar un embreg hirbad.

surmoi, sur-moi ◇ **super-ego** ◇ **dreistme g.** Er bredelfennerezh, unan eus an tri ensav ar benvegad bred, amparet e vez dre berzh diabarzhadur an darvennoù hag ar berzadoù kerentel e-kerz ar bugelvezh, o c'hoari roll ur barner, ur reoler oc'h eveshaat hag o kareziñ ar me.

suroxygénation ◇ **overoxygenation** ◇ **dreistoksigenañ** Oksigenañ gant ur meskad ennañ ur feur oksigen dreist d'an hini reol.

surpoids ◇ **overweight** ◇ **dreistpouez g.** Borrdor leiek despizet gant Aozadur Bed ar Yec'hed (ABY) dre un ditourenn dolz korf gavalet etre 25 hag 29. Deraouiñ a ra ar borrdor er ster dik da 30.

surréflexivité ◇ **hyperreflexia** ◇ **usdamoug g.** Reñver an damougoù.

surrénal ◇ **adrenal** ◇ **1 us-lounezh** aa. **2 uslounezhel** 1 Lec'hiet a-us d'al lounezh. 2 A-zave d'ar wagrenn us-lounezh.

surrénale ou **glande surrénale** ◇ **adrenal gland** ◇ **gwagrenn b. us-lounezh, gwagrenn uslounezhel, uslounezhenn b.** Gwagrenn enborc'hañ daoudañvat, war-dro 6 g an tolz anezhi, lec'hiet a-us hag e-barzh pep lounezh. Enni ez eus daou barzh diforc'h kaer ent gwiaoniel hag ent bevedourel, ar vezonuslounezhenn hag ar gaenuslounezhenn.

surrenalectomie ◇ **adrenalectomy** ◇ **uslounezhennvezañ** Dazbidañ un pe an div wagrenn us-lounezh.

surréalite ◇ **adrenalitis** ◇ **uslounezhennfo g.** Tanienn ar gwagrennoù us-lounezh.

surréalome ◇ **adrenal tumour** ◇ **surrenalom g.** Nep yoc'henn kuñv pe yud an uslounezhenn. Lakaat a reer kemm etre ar *kortikosurrenalom* hag ar *medullosurrenalom*.

surrénalotrope ◇ **adrenaltropic** ◇ **uslounezhennwezher** aa. A-zivout un danvezenn (un hormon, da skouer) o kentraouiñ arc'hwel an uslounezhenoù.

surrénoprive ◇ **adrenoprival** ◇ **ec'huslounezh** aa. (sl. *adrénoprive*).

sursumvergence ◇ **sursumvergence** ◇ **uswariañ** Loakrerezh gant gwariadur a-zerc'h al lagad war-du an nec'h.

sus-acromiotomie ◇ **uskernskoazenbenañ** Skejañ surjianel don kigennoù ar rannbarzh us-kernskoaz war-benn kevaraezañ argestummadur ar c'hef (krouell varv), e degouezh a lestr ezreol pe pa vez ret embreger ar gwilioud afo (eklampsiezh).

sus-apexien ◇ **supra-apical** ◇ **us-kern** aa. Loet a-us da gern ar galon.

sus-iliaque latéral : **point** ~ ◇ **poent g. us-klun kostezel** Poent lec'hiet a-us da rannbarzh kreizer kribenn ar glun, e par flosk barr kroc'hen an 12vet nervenn etre-kostoù; pouezañ er poent-se a vez laurus a-wechoù el lounezhadoù (Pasteau).

sus-intra-épineux : **point** ~ ◇ **poent g. us-ebarzh-sperenn** Poent lec'hiet a-us hag a-ziaerok ar sperenn glun araok uhelañ, e par flosk nervenn groc'hen kostezel ar vorzhed; pouezañ er poent-se a vez laurus a-wechoù el lounezhadoù (Pasteau).

- suspension** ◇ **suspension** ◇ **1 arluggenn b. 2 skourrañ** 1 Reizhiad o c'hoarvezout eus un heverenn hag eus ur c'horf all en arlugg enni. 2 Hentenn brederiañ anaeziou 'zo eus al livenn gein, anezhi ispilhañ ar gouzviad dre e elgezh hag e zivgazel e-doug un nebeut munutennoù.
- suspensoir** ◇ **suspensory bandage** ◇ **anroad g. sintrañ** Anroad o kevaraezañ sintrañ ar gousac'h en anaeziou foel eus ar glidenn, an argell pe eus funig ar sper.
- suspiciens** ◇ ◇ **krec'hduer aa.** A lak al lagad da dreñ a-grec'hdu. Da skouer, gwiennou nervennoù loc'hañ al lagad oc'h arc'hañ krec'hduadur ar voull lagad.
- suspirieuse : respiration** ~ ◇ ◇ **analerezh g. huanadek** Analerezh a ra un trouz heñvel ouzh un huanad.
- Sussman : éperon de ~** ◇ **Sussman's spur** ◇ **kentrenn b. Sussman** Skeudenn hewel war an aortennlunioù tennet a-veskell diaraok kleiz : balirad bihan war drolinenn diabarzh an aortenn, dres en ardraoñ d'ar strizh, o klotañ ouzh difourk en aortenn eus ur san dalmerel anstank.
- sustentation** ◇ **sustentation** ◇ **kemporzhañ** Harpañ nerzhoù ur c'hlañvour, un darvouded, diwar-bouez ur prederiadur pe ur reol voued.
- sustentation : base de ~** ◇ ◇ **diaz g. harpañ** Evit ur gouzrec'h en e sav, egor bevennet gant an daou droad hag an eeunennoù oc'h eren ar seulioù diouzh un tu ha poentoù harpañ a-raok an treid diouzh an tu all.
- Sutherland : syndrome de ~** ◇ **Sutherland's syndrom** ◇ **azoniad g. Sutherland** Gant ar bugel, kevreted uswask talmerel, kalionwadisvec'h gant alkaloz kennevidel, uc'haldosteronegezh kentael gant perzh renin plasmatek izel. An kez azoniad hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, nemedennek ha dianav e arbenn, zo kuradus dre an deksametazon (sl. *Liddle : syndrome de ~*).
- Sutton : maladie de ~** ◇ **Sutton's disease** ◇ **kleñved g. Sutton** Anaez kroc'hen naouus dre vezañs un nevuz livegat e kreiz ur vrizhenn vitiligo.
- suture** ◇ **suture, stritch** ◇ **1 krafaelañ ; krafaelad g. ; dlita 2 mellez b. -ioù** 1 Er surjianerezh, degas e diastok an div vriell eus ur gouli pe assav kendalc'hegezh ur gwiad pe un organ rannet dre araez ur gwriadur gant neud, bac'higoù pe anroadoù englenus (sl. *occlusion*²). 2 Er gorfadurezh, rizh kenvell ma 'z eo ar gwiad kenglenañ etreeskernel amzoues ha ma emañ an talbennoù kenvellañ hogos e diastok war-eeun, hep loc'husted ebet. Kenvelloù eskern ar bolzpenn zo mellezioù.
- suture en bourse** ◇ **purse string suture** ◇ **krafaelañ e liamm yalc'h** Krafaelañ dre dremen an neudenn en dro d'un igorenn gelañ hiek a serrer pa sacher daou benn an neudenn evit o skoulmañ.
- suture crânienne** ◇ **cranial suture** ◇ **mellez b. ar c'hloppenn** Linenn genuniañ daou askorn plat a 'r volzpenn. Gant an nevezc'haned : - 1^o diouzh an *ahel a-saezh, mellez an tal* o kenuniañ div hanterenn an askorn tal, kendalc'het war dreñv en tu all d'ar feunteunig araok (e stumm ul lankell), gant ar *vellez etre-kitem*, o tibenniñ er feunteunig adreñv (tric'hornek); - 2^o diouzh an *ahel a-dreuz, a-ziaaraok, mellezioù ar gurunenn*, o kenuniañ an eskern tal ha kitem, astennet eus ar feunteunig araok d'ar feunteunigoù kostezel araok; a-ziadreñv, ar *mellezioù lambda*, o kenuniañ an eskern kitem hag an askorn kilpenn, astennet eus ar feunteunig adreñv da feunteunigoù ar vrennigenn. Soutadur rakkoulz an kez mellezioù a zevoud ar mellezdlidadoù diseurt (sl. *craniosténose, craniosynostose*).
- suture primitive** ◇ **primary suture** ◇ **krafaelañ kentael** Krafaelañ ur gouli e-pad an eurvezhioù kentañ.
- suture primitive retardée** ◇ **delayed suture** ◇ **krafaelañ kentael daleet** Desezañ a reer an neudennoù goude bezañ naetaet ur gouli ha mar dedro en un doare bastus e vo stardet an neudennoù war-dro ar 5t deiz.
- suture de rapprochement** ◇ **relaxation suture** ◇ **krafaelañ denesaat** Krafaelad amparet gant gwriou don oc'h eskoriñ a-bell diouzh brielloù ur gouli, amkanet da hepkoriñ ur reñver stennadur war ar c'hrafaelad e unan pe da gengovliñ ledan ar gwiadoù.
- suture secondaire** ◇ **secondary suture** ◇ **krafaelañ eilvedel** Krafaelañ ur gouli kozh naet ha tiñvennus, goude bezañ dazbevaet ha deloc'het ar brielloù anezhañ.
- suture en surjet** ◇ **running suture** ◇ **sourjelliñ ; sourjell b.** (sl. *surjet*).
- Svedberg : unité ~** ◇ **Svedberg unit** ◇ **unanenn b. Svedberg** Anvet ivez *Sf* (Sz. *Svedberg of flotation*), unanenn amkanet da spizañ, hervez an ec'honadoù anezho, ar rummoù diseurt a volekul protidolipidek (pe a lipoprotein) eus ar gwadveiz, disrannet an eil re diouzh ar re all ha goubaret diouzh ar proteinoù, e-kerz un dreisttronizhadur hirbad, bennoz d'an douesterioù kevarall anezho. Gant ar gouzrec'h bonan, bihanik eo ar molekul (Sf eus 2 da 6) : e-doug an ateroskleroz ez eus, war yun, molekul ec'honekoc'h (Sf eus 10 da 20) hag euvradur druzoni a zevoud dinodadur molekul bras kenan (Sf uheloc'h eget 100).
- Swan : syndrome de ~** ◇ **Swan's syndrome** ◇ **azoniad g. Swan** Azoniad arsellet e loarkrezhioù diabarzh 'zo, ma kengerc'h an daou welahel hervez ur c'horn eus 12 da 18 °, e doare m'en em ampar ar skeudenn, er gweled daoulagadel, war vrizhenn dall al lagad gwariet ha, war un dro, war vrizhenn luc'hsae al lagad all : n'eus daouwel ebet enta. Arsellet e vez an azoniad-se en usstiwelioù 'zo gant ankeitstiwel.
- Sweet : syndrome de ~** ◇ **Sweet's syndrome** ◇ **azoniad g. Sweet** Dinodadur plakennoù laurus war an divesker, an dremm hag ar gouzoug, kevret gant terzhienn hag un elwenn gant granulokit neutrofil. Dianav eo an arbenn anezhañ ha herrek eo ar pare dre ar c'haengurañ.
- sycéphalien** ◇ **sycephalus** ◇ **sikefalian g.** Euzheg daouat dezhañ daou gef dispartiet en traoñ ha kempaget a-us d'ar begel, daou benn kempaget, pevar ezel krec'h ha pevar ezel traoñ.

- syccosis** ◇ **syccosis** ◇ **sikoziz** g. Kroc'henad naouus dre danijenn bole'hennoù blevel ar barv, gant furmadur burbuennoù bihan kernennek, distroll pe bodet. Bez' ez eus ur *s. eeun* a orin bakteriel (stafilokokel) hag ur *s. trikofitek*. Evit ar *s. lupuzvanek* (Gl. *s. lupoid* Sz. *lupoid* s.) zo ur furm henek gant diwaoutad kleizennel kreiz.
- sydnominine** ◇ **sydnone imine** ◇ **sidnonimin** g. Rumm liaoù enepkevenkez dezho, evel an deveradoù nitret, ur gwered delaoskus war gaherwienn levn speurioù ar gwazhied hag ouzhpenn se perzhioù enepdazus pladanoù.
- sylvienne** : **syndrome de l'artère** ~ ◇ **middle cerebral artery syndrome** ◇ **azoniad g. talmerenn grenn an empenn** Furm baotañ a voukadur empenn, devoudet gant anforzh talmerenn grenn an empenn. Naouiñ a ra dre ul ledseizi holltel pe o souriñ war un ezel pe war an dremm, dre strafuilhoù test padennek ar santout ha, diouzh an dro, dre un ankomez, ul ledangwel unsko.
- Sylvius** : **chair carrée de** ~ ◇ **quadrate muscle of sole** ◇ **bigenn b. garrezek ar sol pe adbigenn bleger ar bizied troad** Bigenn stennet eus an askorn seul da stirenn ar bigenn bleger hir ar bizied troad.
- Sylvius** : **scissure de** ~ ◇ **Sylvian sulcus** ◇ **nant g. kostezel** Nant don loet war dal kostezel an hanterenn empenn, o tistrannañ an tolbezennoù tal ha kitem en nec'h, diouzh an dolbezenn ividig en traoñ.
- symbiose** ◇ **symbiosis** ◇ **kedvevadezh b.** Kevredadur padek etre daou pe lies bevedeg, pep hini o c'hounit korvo.
- symblépharon** ◇ **symblepharon** ◇ **simblefaron** g. Glenadur, darnel pe hollel, ar valvenn ouzh boull al lagad.
- symbrachydactylie** ◇ **symbrachydactylia** ◇ **ished hag anskar g. ar bizied** (sl. *brachysyndactylie*).
- Syme** : **amputation de** ~ ◇ **Syme's amputation** ◇ **ambid g. Syme** Ambidañ an troad e par kenvell an ufern.
- Symonds** : **syndrome de** ~ ◇ **Symonds's syndrome** ◇ **azoniad g. Symonds** Uswask enklouennel berbad e-kerz souzvezh ur skouarnfo krenn ; devoudañ a ra ur c'hloppennad, ur gouliñv dassavel eus ar vegenn hag a-wechoù gwadliñvoù al luc'hsae pe, zoken, ur seizi tremeniat eus ar VI¹ re nervennoù a-gloppenn.
- sympathalgie** ◇ **sympatheticalgia** ◇ **simpatost b.** Laur nervstruzhel e par un nervenn, ur gangrenn pe ur plezhad simpatek.
- sympathectomie** ou **sympathicectomie** ◇ **sympathectomy** ◇ **simpatezvenañ** Dazbidañ surjanel ur gangrenn, un nervenn e par keff simpatek ar bruske pe ar gouzoug. Amkanet eo da zec'han ur gwazhiedfrankaat en tachad e dalc'h ar rann nervenn dilamet. Embreget e vez e degouezh a dalmerennfo stevius (*s. trodalmerel* gant ezvenadur feur gellaouek an dalmerenn ; *s. loanel*) ; gwechall e oa bet ergemennet evel prederiadur an uswask talmerel (dazbidañ an hedad dargreizel a-loan : oberatadenn Smithwick).
- sympathicisme** ◇ **simpatnervost b.** Nervost simpatek.
- sympathicogénique** ◇ **sympathicogenic** ◇ **simpadien aa.** A orin simpatek.
- sympathicolitique** ◇ **sympathicolytic** ◇ **tolc'her aa. & g. simpatek ; simpatolitek aa. ; simpatoliteg g. -eier** O tolc'hañ arc'hwelerezh an nerveizhiad simpatek.
- sympathicomimétique** ◇ **sympathicomimetic** ◇ **simpatomimetek aa. ; simpatomimeteg g. -eier** O kaout war ar bevedeg gweredoù leteñvel ouzh re fraouerezh an nerveizhiad simpatek.
- sympathicothérapie** ◇ **sympathicotherapy** ◇ **simpatikoterapiezh b.** Refleksologiezh enfriell oc'h arverañ poentoù damoug, lec'hiet war c'hlaourgenn kavenn ar fri, a zo paot warnañ dibennoù nervennoù ar reizhiad simpatek, ouzh e eren ouzh an organoù.
- sympathicotonie** ◇ **sympathicotonia** ◇ **usren g. simpatek, simpatikotoniezh b.** Broudedigezh pe muiégezh werederezh an nerveizhiad simpatek, naouus dre ur gwazhiedandag, un uswask, ur mabusvoll, ur c'halonustead, h.a. Heñvelster : *midant hipersimpatikotonek*.
- sympathicotonique** ◇ **sympathicotonic** ◇ **1 usreek aa. simpatek ; simpatikotonek aa. 2 usreel aa. simpatek ; simpatikotonek** 1 Gant an usren simpatek. 2 A-zave d'an usren simpatek.
- sympathicotropisme** ◇ **sympathicotropism** ◇ **kerc'husted aa. simpatek ; simpatkerc'husted b.** Broudested danvezennoù 'zo (a lavarer *kerc'hus simpatek* pe *simpatkerc'hus*) war ar reizhiad simpatek. Naouiñ a ra dre vuanadur korvez ar galon hag uheladur ar gwask talmerel.
- sympathique** ◇ **sympathetic** ◇ **simpatek aa.** 1 A-zave d'an nerveizhiad simpatek 2 a-zave da azlamm un direizh organell war un organ all. Da skouer : *laurioù simpatek an dremm* pe an *algodistrofiezh simpatek* an termen gallek zo heñvelster gant *nervreizhiad simpatek*.
- sympathique cervical postérieur** : **syndrome** ~ ◇ **Barré-Liéou syndrome** ◇ **azoniad g. simpatek an askil ; azoniad Barré-Liéou** Azoniad naouus dre ur c'hloppennad sezet en askil hag e rannbarzh ar c'hilpenn, dre drolemioù, trelladurioù, boudinelloù hag a-wechoù strafuilhoù gwazhiedloc'hadel hag andagoù an dremm. Dinodiñ a ra e-kerz remm al livenn c'houzoug ha devoudet e ve gant hegadur ar plezhad simpatek a zo en dro da dalmerenn ar mellkein (sl. *vestibulaire* : *syndrome* ~).
- sympatholyse** ◇ **sympatholysis** ◇ **simpatoliz g.** Distruj pe heudadur elfennoù nerval a 'r reizhiad simpatek.
- symphalangie** ◇ **symphalangia** ◇ **kedoeñs g.** Kammneuziad ar bizied, anezhañ kendeuzad an oeñsoù eus un pe lies biz dorn pe troad. Naoued hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek.
- sympatnie** ◇ **simfatnienn b.** Krommenn amparet gant gwareg al logigoù, chagellel pe karvanel.
- sympysaire horizontale** : **ligne** ~ ◇ ◇ **linenn b. ar juntad a-zremm** Dremmlinenn oc'h eren kern an daou drochanter bras hag o tremen dre ribl uhelañ juntad ar c'haezour. Talvezout a ra da spisverk evit andalañ dilec'hiadurioù an trovaleg bras en torroù pe disvelladoù al lez.

- symphyse** ◇ **1 symphysis 2 adhesion** ◇ **1 juntad g. 2 glenad g.** 1 Kenvellad ma emañ an talbennoù erreet gant diskoù stivrigornek, evel da skouer ar mellennoù pe juntad ar c'haezour. Seurt kenvell ne gevaraez nemet fiñvoù bevennet kenan. 2 Glenadur ezreol div feilhenn ul levrgenn.
- symphyse cardiaque** ◇ **adhesive pericarditis, cardiac symphysis** ◇ **amgalonnenfo g. englenus; glenad kalonel** Glenell o kempegañ div feilhenn an amgalonenn pe an amgalonenn ouzh an organoù nes. A-wechoù e teva an amgalonenn en ur glorenn stirek oc'h amwaskañ ar galon, pezh a zevoud direizhoù en arc'hwel ar galon.
- symphyse pleurale** ◇ **pleural adhesion** ◇ **glenad g. ar c'hrezoù** Glenell div feilhenn ar c'hrezoù, diwar dreuzfurmatur un naouezenn grezoù en ur gwiaed kenglenel stirek.
- symphyse rénale** ◇ **fused kidney** ◇ **glenad g. al lounezhi** Kempegadur hollel pe darnel parenkim an div lounezhi, loet reol pe ezlec'hiat. Devoudet eo gant soutadur an div eginenn lounezhi e-doug eil mizvezh an enkrozhvezh. Luniad ar parenkimoù ned eo ket darallet, forzh degorzhañ pep lounezhi zo bezant hag arc'hwelel. Ur glenad untu eus al lounezhi a ere blein izelañ ul lounezhi da vlein uhelañ an eil ezlec'hiat a-eiltu, hogen lies furm a c'hell c'hoarvezout, ar re baotañ anezho o vezañ al lounezhi sigma, al lounezhi toreek, hag al lounezhi houarmmarc'hek pergen.
- symphysite** ◇ **symphysis** ◇ **kaezourjuntadfo g.** Tanienn juntad ar c'haezour.
- symptomatique** ◇ **symptomatic** ◇ **1 azonek aa. 2 azoniek aa. 3 azonus aa. (da)** 1 Oc'h erzerc'hañ dre azonoù klinikel, enebet ouzh *diazon*, hep azon klinikel. Bez' ez eus anaezioù *unazonek* ha reoù all *nemeurazonek*. 2 A-zivout ur prederiadur, gweredoù ul lia, amkanet da lemel un pe lies azon. 3 O tarvezout evel azon dibarek un anaez, da skouer evel an ASR (antigen spesadel ar raksavenn) a vez an usvec'h gwad anezhañ *azonus da* anaezioù ar raksavenn, d'ar c'hankr pergen. En degouezh-mañ e c'haller ivez ober gant ar verb *azonañ*. Er skouer roet amañ diaraok e ve tu da lavarout : "usvec'h gwad an ASR a azon anaezioù ar raksavenn".
- symptomatologie** ◇ **symptomatology** ◇ **1 azoniadur g. 2 azonouriezh b.** 1 Teskad an azonoù o tezverkañ ur c'hleñved pe ur c'hlañvour. 2 Diskiblezh o studiañ azonoù ar c'hleñvedoù.
- sympôme** ◇ **symptom, complaint** ◇ **azon g.** Nep erzerc'had ur stad kleñvedel, merzhet gant ar gouziviad e unan (*a. dangorel*), pe dizoloet gant ar mezeg (*a. ergorel*). An azonoù a gevaraez an deznaou. Evit aozourion 'zo ne zlefe an azon bezañ ken nemet ar strafuilhoù arc'hwelel merzhet gant ar gouziviad e unan, ar re ergorel o vezañ *arouezioù*.
- Synacthène®** : **test au ~** ◇ **proud g. ar Sinakten** Proud kentraouiñ o kevaraezañ gwiriañ arc'hwelerezh ar gwagrennoù us-lounezhi. Arveret e vez evit kendaoliñ da zezaou ar skorted uslounezhel. Un erlamadenn wad a vez graet a-raok ar proud da savelañ live diazez ar c'hortizol ha da heul ez ensinkler ar Sinakten evit kentraouiñ ar gwagrennoù us-lounezhi da vorc'hañ kortizol. Erlamet e vez ar gwad goude 30 min, a-wechoù 45 min, ha goude 60 min. Gant un arc'hwel uslounezhel bonan e rank daougementiñ ar gwadvec'h kortizol, da vihanañ.
- synadelphe** ◇ **synadelpus** ◇ **sinadelf g.** Euzheg daouat gant ur penn hag ur c'hef hepken, pevar ezel krec'h ha pevar ezel traoñ.
- synalgésie ou synalgie** ◇ **synalgia** ◇ **kefinost b.** Nervost o tarvezout e-kefin ul laur grizias.
- synalléognathie** ◇ **keavengeidañ** Stad an div aven o virout arstalek ar c'heñver etre ar c'henfeuriou anezho, daoust d'an argemmoù en dremm a-bezh er gouennoù ketep.
- synapse** ◇ **synapse** ◇ **sinaps g.** Rannbarzh treuzkas an nervlanv etre akson un neuronenn hag an dendrit pe korf kellig un neuronenn all.
- synaptique** ◇ **synaptic** ◇ **sinapsel aa.** A-zave d'ar sinaps.
- synaraxie** ◇ **sinaraksif** Doare ma kenstok an dent pa serrer ar genoù.
- synarthrose** ◇ **synarthrosis** ◇ **kenarzd g.** Kenvell diloc'h ma emañ an eskern e diastok dre ur c'houblad stirek (kenstirad), migornek (kenvigornad) pe askornek (kenaskornad).
- synchilie ou synchilie** ◇ **synchilia** ◇ **glenell b. gweuz-ribl, sinkeiliezh b.** Glenadur an divweuz ouzh ribl al logigoù, a orin kleizennel.
- synchisis ou synchysis** ◇ **synchysis** ◇ **sinkiziz g.** Boukadur, kantalc'h berusoc'h ar gwereg, hag ouzhpenn se, demerennoù ennañ hag anafoù an dolgennsae. — *s. fulennek* : merzhidigezh pikoù lugernus heloc'h diwar vezañs euflennoù kolesterol er c'horf gwerek.
- synchroniseur** ◇ **synchronizer** ◇ **goubreder g.** Parenn a zo e dalc'h kellusk an argemmoù korvezek anezhi korvezioù bevedel ur bevedeg kizidik. Da skouer : pebeiladur an deiz hag an noz a zelnavad korvezioù trozeziat ar gwrezverk loenel, degorz an dour, an natriom, borc'hadur an hormonoù, h.a. (sl. *circadien* ha *chronobiologie*).
- synchrotron** ◇ **synchrotron** ◇ **sinkrotron g.** C'hwimmer elektron ha proton o c'houlankañ dezho kementadoù gremm uhel kenan a urzh gant 105 MeV.
- syncnésie** ◇ **synkinesis** ◇ **kevellfiñv g.** Fiñv andiarvenn, diamkan, ur parzh a 'r c'horf, a-ser gant ur fiñv diarvenn eus ur parzh all a 'r c'horf.
- synclitisme** ◇ **synclitism** ◇ **kenstou g.** Kenstur eo ahel lestr ar vamm hag ahel penn ar grouell e-kerz ar gwilioud. Lavaret e vez : *kenstouat eo an erload* (Gl. *présentation synclite*).

- syncope** ◇ **syncope** ◇ **ezwal** g. -ioù Koll kenskiant klok ha berrbad, eilvedel d'un anoksiezh empenn feuls, a orin liesseurt : strafuilh kalonel, iswask talmerel trumm, striv, h.a. (sl. *lipothymie*). — A-wechoù e vez graet *ezwal lec'hiek* eus astal an amred gwad en ur parzh eus ar c'horf hevonn strizh, evel m'en arseller e kleñved Raynaud (sl. *défaillance*).
- syncytiome** ◇ **syncytioma** ◇ **sinkitiom** g. Yoc'henn furmet diwar goust ur gellig sinkitel.
- syncytium** ◇ **syncytium** ◇ **kellig** b. **sinkitel**, **sinkitenn** b., **sinkit** s. Tolzenn gitoplasm bevnet gant ur goc'henn, enni lies kraoñell hag amparet dre gendeuz lies kellig (sinkit eo kelligoù ar c'higennoù rizennek).
- syndactylie** ◇ **syndactylia** ◇ **bizanskar** g. Kammneuziad c'hanedigel naous dre gensoutadur un pe lies biz dorn pe troad.
- syndesmodysplasie** ◇ **syndesmodysplasia** ◇ **stagellviwe** g. Gwariad diorren ar stagelloù.
- syndesmodexie** ◇ **syndesmodexia** ◇ **stagellAanlenañ** AAAnlenañ surjanel ur stagell.
- syndesmophyte** ◇ **syndesmophyte** ◇ **stagellaskornadur** g., **sindesmofit** g. Askornaat stagelloù ar c'henvelloù, ent dibarek ar c'horfoù mellenn, eus an unnekvet mellenn vrusk d'an eil mellenn dargreiz.
- syndesmophytose** ◇ ◇ **sindesmofitoz** g. Bezañs sindesmofitoù.
- syndesmoplastie** ◇ **syndesmoplasty** ◇ **stagellatelviñ** Azneuziañ surjanel ur stagell.
- syndesmose** ◇ **syndesmosis** ◇ **sindesmoz** g. Seurtad kenvell diloc'h stirek (kenstirad) a zo an araezioù stagañ anezhañ amparet gant stagelloù. Da skouer : ar c'henstagellad (pe, kenvell) skin-spilhenn pellek.
- syndesmotomie** ◇ **syndesmotomy** ◇ **stagellenbenañ** Sjeañ surjanel ur stagell.
- syndrome** ◇ **syndrome** ◇ **azoniad** g. Teskad azonioù hag arouezioù oc'h amparañ un hennad o tespizañ ent klinikel ur stad kleñvedel savelet. O vezañ ma vez orinoù liesseurt e lakaer kemm, ent damkanel, etre an azoniad hag ar c'hleñved, devoudet (dre bennaenn) gant un arbenn spesadel.
- synéchie** ◇ **synechia** ◇ **sinekiezh** b. Damheñvelster gant *glenell* (Gl. *adhérence*), arveret dre henvoaz evit anafoù dibarek ; er venvouriezh : *sinekiezh krozhel*, *glenell* etre speurioù kavenn ar grozh ; el lagadouriezh : *sinekiezh araok*, kempegad ar ganevedenn ouzh talbenn adreñv ar gornsae, hag ivez, *sinekiezh adreñv*, kempegad ar ganevedenn ouzh ar ferenn.
- synéchetomie** ◇ **synechetomy** ◇ **sinekotomiezh** b. Enbenañ glenelloù pe naskoù. — *s. friel* : loezañ sinekiezhoù ar fri.
- synécéphalocèle** ◇ **synencephalocèle** ◇ **kenempennogad** g. Empennogad ganedigel o tiskouez glenelloù gant ar goloennoù rizhellel kefin (torzhienn, funig, lienennoù).
- synergie** ◇ **synergia** ◇ **kedal** g., **kedalañ**, **kedalerezh** g. Kevelerezh pe gevrederezh gweredoù a-berzh elfennoù (kigennoù, nervennoù, organoù) war-benn diraez pe wellaat un arc'hwel.
- synergie musculaire** ◇ ◇ **kedalerezh kaherel** Kenwered lies kigenn da gefleuniañ ur fiñvadenn (ar c'hontrol o vezañ *gourzhalerezh kaherel*).
- synergie** ou **synergisme** ◇ **synergism** ◇ **kedal** g., **kedalañ**, **kedalerezh** g. Kenwered div vezegiezh o tisoc'hañ gant muiadur o gwerc'h.
- synergie additive** ◇ ◇ **kedal sammañ**, **kedal sammadel** Seurtad kedal mezegiezhel ma vez par ar gwered hollel da sammad ar gweredoù ketep.
- synergie renforçatrice** ◇ ◇ **kedal nerzhañ**, **derarialañ** (sl. *potentialisation*).
- synergiste** ◇ **synergist** ◇ **1 kedaler** aa. **2 kedalerenn** b. 1 A-zivout ur gigen a zo he gwered da-geñver ur fiñvadenn o keveliñ ur gigen all, a reer dre se *kigenn c'haler*; *galerenn*. 2 Kigenn gedaler.
- synestalgie** ou **synesthésalgie** ◇ ◇ **dazverzh** g. **laurek** Laurioù grezvarrek devoudet en anaезioù 'zo (goriaz) gant spinañ, tra ken, ur rannbarzh pell diouzh ar poent laurus.
- synesthésie** ◇ **synesthesia** ◇ **dazverzh** g. Strafuilh nerval a laka da zec'havaelañ ur fraouad arloet ouzh ul lec'h eus ar c'horf el lec'h-se end-eeun ha, war un dro, en ul lec'h all, alies a-eiltu, kemparzhek d'al lec'h fraouat.
- syngamose** ◇ **syngamiasis** ◇ **singamoz** g. Arvevadegezh arsellet e Kreizamerika, devoudet gant ar preñv nematod *Syngamus laryngeus* arvevad briant an dañvad, ar c'havr hag an ejen. Dibaot kenan eo gant an den.
- synophrys** ◇ **synophrys** ◇ **sinofriz** g. Kengej an divabrant e par gwrizienn ar fri.
- synophtalmie** ◇ **synophtalmia** ◇ **keflagadegezh** b. Kammneuziad klopendremmel ganedigel naous dre aruniadur an daou bod lagad war al linenn greizer ha kempegad klok pe glococ'h an daou lagad en unan hepken. Etre an neuz bonan hag ar giklopiezh ez eus an holl zerezioù a geflagadegezh, gant an daou lagad skaret pe skaretoc'h.
- synopsie** ◇ **synopsy** ◇ **livglev** g. (sl. *audition colorée, pseudochromesthésie*).
- synoptophore** ◇ **synoptophore** ◇ **sinoptofor** g. Anvet ivez *amblioskop*, *synoptoskop*, ardivink optikel evit studiañ ar gweled daoulagadel.
- synorchidie** ◇ **synorchism** ◇ **kengellegezh** b. Kempegad darnel pe hollel an divgell, enkofel atav.
- synostose** ◇ **synostosis** ◇ **kenaskornad** g. Soutadur daou askorn, bonan (rizh kenarvad, evel da skouer ar *c'henaskornad genneg-kilpenn*) pe kleñvedel (o tec'han un tromaot).

- synostose radio-cubitale** ou **-ulnaire familiale** ◇ **familial radioulnar synostosis** ◇ **kenaskornad gwerzhid-helmo familhel** Soutadur ganedigel etre talpennoù krec'h ar werzhid hag an helmo, o skoilhañ ouzh ar palvsaviñ hag ar palvstouiñ.
- synostoses multiples : maladie des ~** ◇ **multiple hereditary synostoses** ◇ **kleñved ar c'henaskornadoù liesel** Kamm-neuziadoù hêrezhel treuzkaset hervez ar mod aotzomek trec'hek gant lies soutadur eskern.
- synovectomie** ◇ **synovectomy** ◇ **irgennezvenañ** Dazbidañ surjaniel irgenn ur c'henvell.
- synoviale** ◇ **synovial membrane** ◇ **irgenn g.** Kennenn levrstirek o vorc'hañ an iruzenn hag o pallennañ diabarzh pourc'had ar c'henvelloù. Enleñañ a ra ouzh tro migern ar c'henvelloù.
- synovialome** ◇ **sinovialoma** ◇ **sinovialom g.** Nep yoc'henn furmet diwar goust an irgenn.
- synovie** ◇ **synovia** ◇ **iruzenn b.** Liñvenn voull, levrus, bezant e kavennoù an arzoù ha borc'het gant an irgennoù. Enni ez eus mugin hag ur c'hementad bihan halioù meinel.
- synoviolyse** ou **synoviorthèse** ◇ **synoviorthese** ◇ **irgennloezañ, sinoviordez g.** Prederiadur anaezioù an irgenn dre ensinkladurioù enarzel.
- synoviosarcome** ◇ **synoviosarcoma** ◇ **sinoviosarkom g.** Yoc'henn yud evodet, gant an oadour yaouank, diouzh kelligoù mezenkimatus heñvel ouzh re ar gwiad irgennel. Dinodiñ a reont e par parzhioù meizh ar vorzhed, ar glin, kenvell an ufern, speurioù ar c'hof hag ar brusk.
- synovite** ◇ **synovitis** ◇ **irgennfo g.** Tanijenn lemm pe henek, sec'h pe gant fennadoù, an irgennoù, ar re stirenek pergen. An termen *arzo* a arverer evit irgennoù an arzoù.
- synovite crépitante** ◇ **tenosynovitis crepitans** ◇ **irgennfo gouriñvius** Tanijenn lemm eus feurioù ar stirenoù, naouus dre ul laur kriz hag ur gouriñviad skiltr kenan, evel pa gerzher en erc'h.
- synovite fongueuse** ◇ **fungous synovitis** ◇ **irgennfo fouevanek** Furm a irgennfo torzhellek, naouus dre zinodadur fouevanoù en irgenn.
- synovite à grains riziformes** ◇ ◇ **irgennfo gant greun rizheñvel** Furm a irgennfo torzhellek, naouus dre vezañs greun rizheñvel en irgenn.
- synovite lipophagique** ◇ **lipophagic synovitis** ◇ **irgennfo lipofagel** Anaez remmel o tizhout ar glin hepken, diwar daraezioù, naouus dre fennadoù e par ar c'henvell-se.
- synovite plastique** ◇ **adhesive tenosynovitis** ◇ **irgennfo kenweat** Anvet ivez *irgennfo kendiñvus*, seurtad irgennfo lemm sec'h, naouus dre furmadur e-barzh al levrigen eus un eginenn a c'holoenn, kollet ganti he gwevnded voas (goloenn stirek), o tec'han en doare-se glenelloù stirek.
- synovite villo-nodulaire hémopigmentée** ◇ **hemopigmented villonodular synovitis** ◇ **irgennfo bodennek gwadlivegat** Anaez an oadour yaouank, dianav an arbenn anezhañ, o tizhout ar glin ar peurliesañ, naouus dre un devadur eus an irgenn, kevredet gant bodennoù azgell, enno livegennoù houarnin en ervez da aloubiñ ar gwiad askorn. Naouiñ a ra an anaf-se dre zinodadur an arzwadad arreat. Ar prederiadur a rekiz diren an irgenn.
- synténie** ◇ **synteny** ◇ **kenwidennadezh b.** Lec'hiadur lies lokuz kevarall war an un kromozom. Ar gen bezant war an un kromozom a vez graet *gen kenwidennat* anezho.
- synthase** ◇ **synthase** ◇ **sintaz g.** Nep enzim o kevaraezañ enaoz ur c'hediad dre gengediañ an elfennoù anezhañ.
- synthèse** ◇ **synthesis** ◇ **1 kevanaozañ 2 bevenaazañ, enaozañ 3 kevandodiñ, kendodiñ** 1 Danzen un danvezenn diwar an elfennoù anezhi. 2 Danzen bevedel un danvezenn. 3 Kevanañ lies elfenn war-benn amparañ un unvez nevez (prederouriezh, bredelfennerezh).
- syntonie** ◇ **syntony** ◇ **ketoniañ, ketoniezh b.** Kendon kengannus realezh ur gouzrec'h gant e amva. Unan eus naousterioù ar c'helc'hnoa eo, kevenebet ouzh ar skizoidiezh (pe *skizotimiezh*).
- syphilide** ◇ **syphilid** ◇ **sifilid g.** Anv genadel an holl erzerc'hadoù kroc'hen eus ar sifiliz eilvedel pe tredeel. — *sifilid livegennek* : erzerc'had kroc'hen ar sifiliz eilvedel, o naouiñ dre ur muiadur eus al livegad war c'horrezennoù ledek pe ledekoc'h en dro da rannbarzhioù all reol al livezh anezho.
- syphiligraphie, syphiliographie, syphilographie** ◇ **syphilography** ◇ **sifilizouriezh b.** Diskiblezh o plediñ gant studi ar sifiliz.
- syphilis** ◇ **syphilis** ◇ **sifiliz b.** Anvet ivez gwechall *naplez* (Gl. *mal de Naples, le mal napolitain*), kleñved hollek poreüs hag enkoradus a zo ar gwezher kleñvedus anezhañ *Treponema pallidum* Schaudinn. Deraouiñ a ra dre ul livant argalet kevret gant c'hwarnnoù (*darvoud kentael*), lakaet er-maez pa vez ganedigel pe treuzkaset dre an hent engwazhiedel (treuzskuilhadur); erzerc'hañ a ra goude dre zispuilhadoù kroc'hen ha glaourgen, a-wechoù dre danijennoù flugezel (*darvoudoù eilvedel*); diwezhatoc'h e tinod anafoù dic'henezhadel pe genkizus gwiadou hag organoù diseurt (*darvoudoù tredeel*, gom, skleroziou diseurt). Erzerc'hadoù 'zo — o tarvezout meur a vloaz war-lerc'h deroù ar c'hleñved hag o tizhout ar reizhiad nerval (tabez, sezi hollek), ar benvegad kalongwazhiedel (darvolloù), ar glaourgennoù (leukoplakiezhoù) — zo bet rummet gwechall evel darvoudoù ar *sifiliz pervedel* (dibaot kaer hiziv). — *sifiliz dibennet* (Gl. *syphilis décapitée*) : furm dibarek a sifiliz a grog hep livant deroù. — *sifiliz kentev* (Gl. *syphilis récente, Sz. early syphilis*) : sifiliz dastumet kent ur bloavezh. Seul abretoc'h e vez diournet, seul aesoc'h a se e vez ar prederiadur hag a-walc'h eo un doenad penikilin hepken. — *sifiliz enkelat* pe *sifiliz gwadveizel* : furm a sifiliz hep erzerc'had klinikel ebet, tra ma vez yaek an dazgweredoù hangaewadloezañ, malzenniñ, hangaegendreluc'hañ ha proud Nelson.

— **sifiliz diwezhat** (Gl. *syphilis tardive*, Sz. *late syphilis*) : sifiliz enkelat ouzhpenn ur bloavezh ha sifiliz tredeel. Efedus e vez ar penikilin ivez en degouezh-se.

syphilis : **diagnostic biologique de la** ~ ◇ **biological diagnostic of syphilis** ◇ **deznauo g. bevoniel ar sifiliz** Diazezet e-pad pell war erwezh Wassermann e harp bremañ an deznauo war erwezhioù ersoliadel pe skoueriek arnevez (*VDRL, TPHA, FTA abs. test*).

syphilisation ◇ **syphilization** ◇ **sifilitekaat** Enkorañ arnodel ar sifiliz.

siphilitique ◇ **syphilitic** ◇ **1 & 2 sifilitek** aa. **2 sifiliteg g. -eion** 1 & 2 A-zivout ar sifiliz pe tizhet gant ar sifiliz. 2 Gouzrec'h sifilitek.

syphiloïde ◇ **syphiloid** ◇ **sifilizvanek** aa. Heñvel ouzh ar sifiliz.

syphiloïde post-érosive de Sevestre et Jacquet ◇ **post-erosive syphiloid** ◇ **sifiloid g. dianc'hraspadel** Seurtad ez-kroc'henfo peñsel poreüs ar vagadell, hep keñver gant ar sifiliz, naouus dre un eritem strewet warnañ krugennoù fetis, graspet ha dourasennus ar gorre anezho, sezet war ar feskennoù hag an organoù ganadel, hebiat d'ar plegoù avat.

syphilome ◇ **syphiloma** ◇ **sifilom g.** Yoc'henn a orin sifilitek; gom sifilitek dezhañ neuz ur yoc'henn. — **sifilom fraezh-youle'h** : isvoll foel ar youlc'h sellet gwec'hall evel un darvoud tredeel kentrat eus ar sifiliz, staget hiziv ouzh kleñved Nicolas ha Favre. — **sifilom kentael** : livant argeat.

syringobulbie ◇ **syringobulbia** ◇ **kavnhirvelad g.** Bezañs ur gavenn en hirvel, diwar astenn ur c'havnnvelad, oc'h erzerc'hañ dre strafuilhoù teñvañ ha santout e tiriad nervennoù an hirvel.

syringome, syringocystadénome ◇ **syringoma, syringocystoma** ◇ **siringom g., siringokistom, siringokistadenom** Bolc'hadur saniou ar c'hwez erzerc'h ent klinikel e rezh koagennoù bihan arvelen niverus loet war ar malvennoù (hidradenom ar malvennoù) pe war dalbenn arak ar c'hef (hidradenom dispuilhat Darier ha Jacquet).

syringomyélie ◇ **syringomyelia** ◇ **kavnnvelad g.** Naoued dezverket gant bezañs ur gavenn greiz er mel a-livenn gouzoug-kein, ken emañ boulc'het gwiennoù ar stirad livenn-derc'hvel o tevoudañ un tizhad daoudou e-pign (eleze bevvennet en nec'h hag en traoñ) ha hanbarus ar gwrez-hag al laureraezñ hep strafuilhañ ar stokeraezñ (distroll kavnnveladel). Astenn ar gavenn war-du korn arak ar mel zo en ervez da zec'han miloc'hioù trobarzhel, an astenn war-du ar c'horn adreñv mieraezioù bloc'hel, dezho bepred avat ul lec'hiadur metamerek; emañ an astenn war-du ar c'horn kostezel en ervez da zegas direizhoù pikernennek. Pa astenn ar gavenn betek an hirvel, e komzer eus kavnnvelhirvelad pe zoken eus kavnhirvelad pa vez kantet en hirvel. Ar goulakadur boasañ a-zivout orin ar c'havnnvelad a ra anezhañ ur gammneuziad, an arguzenn harpañ o vezañ liested ar c'hammneuziadoù lec'hiek kevredet (kloppennfoeñv, spina bifida, kammneuziad Arnold Chiari).

syringomyélique ◇ **syringomyelic** ◇ **kavnnveladel** aa. A-zivout ar c'havnnvelad.

syringomyélobulbie ◇ **syringomyelobulbia** ◇ **kavnnvelhirvelad g.** Astenn ar c'havnnvelad betek an hirvel. E degouezhioù 'zo, dibaot kaer, e vez arsellet tolerenioù ha boudinelloù pe ur vouzarded (strafuilhoù rakkambrel).

sysomien ◇ **sysomus** ◇ **sisomian g.** Euzheg daouat gant daou benn dispartiet ha daou gorf kempeget.

système ou **systématisée** ◇ **systematized, sistemic** ◇ **reizhiad, reizhiadel** O toareañ erzerc'hadoù, anaezioù en un tiriad nervaouet pe gwazhiedet gant an un gwriazienn pe an un gwazhiedenn, pe, evit a sell ar skevent, gwentet gant an un bronkezenn.

système dopaminergique ◇ **dopaminergic system** ◇ **reizhiad b. dopaminwerc'her** Teskad an neuron, en nervreizhiad kreiz ha trobarzh, borc'her ha buzer a 'n dopamin (sl. *dopaminergique* ha *récepteur dopaminergique*).

système gabaminergique ◇ **GABA-ergic system** ◇ **reizhiad b. GABAwerc'her** Teskad neuron oc'h erwezhañ en empen ouzh an drenkenn γ -aminobutirek (GABA) (sl. *médiateur chimique, neuromédiateur, neurotransmetteur*).

système HLA ◇ **HLA system** ◇ **reizhiad b. HLA** Gwreskanv diwar ar saozneg *Human Leucocytes Antigen*, strolloù antigenoù gwiadkempadusted, bezant war holl gelligoù kraoñlek ar bevedeg. An antigenoù-se a glot gant ul lokuz kemplezh gannet gant allennoù niverus. A-geñver gant al lokuz ma anad an allelenn e vezont aroueziet evel-henn : HLA-A, HLA-B, HLA-C ha HLA-D. Ar genennoù A, B, C a voneg evit proteinoù, savelet mat, lec'hiet war goc'hennoù holl gelligoù ar bevedeg, o kevarezañ naouat an unevded, dreist holl. Ar c'henenn D (ha HLA-DR) ne voneg ken nemet evit proteinoù antigenek sezet war c'horre ar c'helligoù angorzhet en argerzh hangael (limfokit, makrofag), o talvezout da gannadoù etre al limfokit. An kez genennoù a c'hoari ur roll a bouez e devoud distaol an imboudoù hag ivez e kleñvedoù henek 'zo.

système international d'unités de mesure ◇ **International System of Units** ◇ **reizhiad b. etrevroadel unanennoù** Reizhiad unanennoù dezvel angemeret gant lies riez. En orin e c'hoarveze a deir unanenn diazez : ar metr (m) evit an hedoù, ar c'hilogramm (kg) evit an tolzoù hag an eilenn (s) evit ar padoù. Adalek 1954 e voe ouzhpennet an amper (A) evit ar redoù tredan, ar c'helvin (K) evit ar gwrezverkoù gwreznerzhoniel hag ar c'handela (cd) evit al luc'hreadoù. E 1971 e voe ouzhpennet c'hoazh ar mol (mol) evit ar c'hementadoù danvez. Unanennoù deveret a vez graet eus an unanennoù all.

système nerveux autonome ◇ **autonomic nervous system** ◇ **nervreizhiad b. emrennek** Hollad al luniadoù nerval kreiz ha trobarzh (kangrennoù ha nervennoù) a gendaol da arouleviañ arc'hwel bonan an holl organoù ha gwiadoù, ent dizalc'h diouzh ar bed diavaez, en ur ziogeliñ ur c'henurzhadur hag ur c'hengannadur rekis eus an arc'hwelioù diseurt. Ar reizhiad emrennek ne geveneb ket ouzh ar reizhiad nerval kreiz, o chom en he dalc'h hag o tasperzhiañ drezi en arc'hwelioù diseurt eus ar c'hemoned hag

eus ar c'hantaezañ. C'hoarvezout a ra eus ar reizhiad parasimpatek hag eus ar reizhiad ortosimpatek. Menegomp an heñvelster : *nervreizhiad struzhel* pe *reizhiad nervstruzhel*.

système nerveux central ◇ **nervous central system** ◇ **reizhiad nervec kreiz, nervreizhiad kreiz, nerveg b. kreiz** Nerv-reizhiad ar c'hemoned, enni an empenn hag ar mel a-livenn.

système nerveux parasympathique ◇ **parasympathetic nervous system** ◇ **reizhiad parasimpatek, nervreizhiad parasimpatek** Unan eus div elfenn an nervreizhiad emrennek.

système nerveux sympathique ◇ **sympathetic nervous system** ◇ **reizhiad simpatek, nervreizhiad simpatek** Heñvelster gant *reizhiad ortosimpatek*, unan eus div elfenn an nervreizhiad emrennek. Gwerediñ a ra dre hantererezh daou hanterad kimiek, an adrenalin hag an noradrenalin.

système porte ◇ **portal system** ◇ **reizhiad porzh** 1 Benvegad gwazhiedel, talmerel pe wazhiennel, amparet gant ur wazhiedenn, ur rouedad korrwazhiedel en he daou benn. 2 Reizhiad ar wazhienn borzh : hollad amparet gant kef ar wazhienn borzh, ar barroù diouti, ar barroù kengostezel hag ar barroù dibenn anezhi.

système T ◇ **T system** ◇ **reizhiad T** Emouinadurioù pibellek diadrez ar sarkolemm o vont e-barzh ar c'haerwiennoù rizennek.

systémique ◇ **systemic** ◇ **1 reizhiad, reizhiadel aa., sistemel aa. 2 trogorfel aa., trogorfat aa.** 1 A-zave d'ur reizhiad pe da elfennoù parzhiat en un reizhiad. 2 A-zave d'an amred bras, d'ar c'horf en e bezh.

systole ◇ **systole** ◇ **sistol g.** Lankad argrezañ ar galon, o c'hoarvezout eus : argrezañ diaser an daou gentez, heuliet gant argrezañ an daou gofig, war-benn kas ar gwad en aortenn hag en dalmerenn skevent. Ar sistol kofigel a glot gant an trouz kalon kentañ, tos ar gern ha talm an talmerennoù.

systole en écho ◇ **atrial sound** ◇ **sistol heklev, galoup g. an tolc'had** Heñvelster gant *galoup an tolc'had* trouz kalon (pevare trouz) goloet a vez klevet a-wechoù da geñver un distroll kentez-kofig (tolc'had kentez-kofig klok), en entremez an trouzioù kofigel bonan 6) pevare trouz (T4) (Gl. *quatrième bruit*, B4, Sz. *fourth heart sound*, S4), daskren izeldalm a-raok an trouz kentañ, dinoet dre ar c'halonstenwezer, test eus sistol ar c'hentez.

systole électromécanique ◇ **electromechanical systole** ◇ **sistolvezh tredanel-treloc'hel** Pad o vont eus deroù gwagenn gofigel herrek QRS ar c'halonvarrwevad betek kedaozenn aortek eil trouz ar galon spislec'hiet war ar c'halonstenwezad (Q-A2), ent reol par da 0,37 sec.

systolique ◇ **systolic** ◇ **1 sistolek aa. 2 sistolel aa., a-sistol aa.** 1 Devoudet gant ar sistol, da skouer : *sourr sistolek*. 2 A-zivout ar sistol.

T

T ◇ **T** ◇ **T** Arouez — 1° *tera* (10¹²). — 2° *tesla* (sl. an termen). — 3° an *treonin*. — 4° an *timin*.

TA ◇ **BP, blood pressure** ◇ **1 GT 2 TA** 1 Berradur *gwask talmerel*. 2 Berradur *Terminologia Anatomica*, erlec'hiet adalek 1998 ouzh an *Nomina Anatomica*.

tabac ◇ **tobacco** ◇ **butun** *g.* Delioù sec'het *Nicotiana tabacum*, plantenn eus kerentiad ar Solaneged, a c'hell bezañ chaoket, ruflet ha, dreist holl, butunet. An elfennoù pistriek pennañ anezhañ zo an *nikotin*, kiriek d'an estoue ha d'ar rouestladoù talmerel (aterom, andag ha tromboz) eus ar vutunegezh; ar *vonoksidenn garbon* (CO) devouder oloksigen; danvezennoù hegus ha kankreiat (forzhioù analañ ha koazhañ uhelañ, bronkez, c'hwezhi-gell) bezant en terioù.

tabacologie ◇ **tabacology** ◇ **butunouriezh** *b.* Studi ar butun hag ar gweredoù anezhañ war ar bevedeg.

tabagisme ◇ **tabagism, nicotinism** ◇ **butunegezh** *b.* Pistriadur lemm pe henek gant ar butun. — *b. gouzañvat* (Gl. *t. passif*, Sz. *passive smoking*): butunegezh henek arsellet gant ar c'houzrec'hed anvutuner o vevañ en un aergelc'h leun a voged butun.

tabatière anatomique ◇ **anatomical snuff-box** ◇ **boest** *b. vutun korfadurel* Pukadennig vigelc'hiek lec'hiet war dalbenn adreñv-diavaez an arzorn, bevvennet gant stirennoù kigennoù astenner berr ha hir ar meud, o pellaat an eil diouzh egile da geñver argezedur an kez kigennoù (aze e veze lakaet ar butun fri).

tabes ou tabès ◇ **tabes** ◇ **tabez** *g.* Nervanaez a orin sifilitek, naouus ent neuziadurel dre anafoù dic'henezhadel gwriziennoù adreñv ha pañsoù adreñv ar mel a-livenn, oc'h erzerc'hañ ent klinikel dre strafuilhoù an doneraeziañ gant steuz an damougoù, istant, digenurzh (ankedre, arouez Romberg yaek), barradoù laurus grezvarrek a lec'hiadurioù diseurt, un tizhad eus nervennoù klopennel 'zo ha strafuilhoù teñvañ. Yaek eo dazgwered Border-Wassermann el liñvenn benn-kein.

tabès dorsal spasmodique ◇ **spasmodic tabes dorsalis** ◇ **tabez kein dasstrizhek** Azoniad ar mel, liesseurt an orin anezhañ, ha deskrivet da gentañ evel un naoued hiniennek. Naouus eo ent neuziadurel dre ur skleroz kemparzh eus rann emeal an hordennoù pikennnek hag ent klinikel dre ur seizi dasstrizhek war astenn en izili traoñ, gorrek hag argreskus an dedreiañ anezhañ (sl. *Erb : paraplégie d'~*).

tabétique ◇ **tabetic** ◇ **1 tabezek** *aa.* **2 tabezel** *aa.* **3 tabezeg** *g. -eion* 1 Gant an tabez. 2 A-zave d'an tabez. 3 Gouziviad tabezek.

tabéto-cérébelleuse : démarche ~ ◇ **Charcot's gait** ◇ **argenk** *g. tabezilpennel* Argenk dibarek arsellet e kleñved Friedreich, o tennañ war un dro da argenk an ankedre boutin (divesker taolet amparfal a bep tu) ha d'an horjellañ piaouel da anafoù an ilpenn.

tabéto-spasmodique : démarche ~ ◇ **tabeto-spasmodic gait** ◇ **argenk** *g. tabezandagel* Argenk arsellet er sklerozioù strollet, ma vez kevredet an ankedre ha brac'hitell andagel an troad o pouezañ war al leur.

tableaux A, B et C ◇ ◇ **taolennoù A, B ha C** Rolloù ma oa enskrivet an danvezennoù pistriek arveret er vezekniezh hag a oa ar pren, ar piaou, ar gwerzh hag an arver anezho reolennet gant deved an 19 du 1948. Renket e oa an danvezennoù pistriek en daolenn A, ar baderioù en daolenn B hag an aozadoù dañjerus pe da vezañ miret en disparti en daolenn C. — Deved an 29 kerzu 1988 en deus daskemmet reolennadur hollek an danvezennoù pistriek, rummet adalek neuze e danvezennoù *dañjerus, pistriek, bader* (da heul an daolenn B) ha *bredwezher*. An daolenn A kent a zeu da vezañ al *Listenn I* hag an daolenn C kent al *Listenn II* (sl. *médicament soumis à prescription*).

tablette ◇ **lozenge, tablet** ◇ **tablezenn** *b.* Angevezh apotikel sonnel, peurvuiañ brasoc'h eget ar badellig, reizhkom pe ront, ennañ ur c'henfeur sukr uhel hag ur c'hementad lia bihan, da lakaat da deuziñ er genoù.

tabouret : signe du ~ ◇ ◇ **arouez** *b. an tous* Gant ar skoedusvorc'heion, diaester da sevel ur gouziviad en e goazez war un tous izel, oc'h erzerc'haat ar c'hahernaoud skoedennien.

tache bleue sacrée ◇ **mongolian spot** ◇ **lijorenn** *b. c'hlas ar groazell* Lijorenn c'hlazik al livrezh anezhi, gant un drolinenn dispis, ledek pe ledekoc'h, sezet er rannbarzh al loan, ar groazell pe ar rannbarzh peñsel, a vez arsellet gant hogos an holl vagadelled aziat, dibaot gant ar re wenn. Ur seurtad nevuz eo, a steuz goude un nebeut bloavezhioù. A-wechoù e vez kavet gant bugale a ouennoù all.

tache hépatique ◇ **naevus spilus** ◇ **lijorenn b. c'hlas ar groazell** Seurtad nevuz livegat naouus dre vrizhennoù gell bras pe vrasoc'h ha reoliek, ma n'eus kemm all ebet evit ar c'hroc'hen en o far. Unan eus azonoù kleñved Recklinghausen eo.

tache rubis ◇ **papillary varix** ◇ **brizhenn b. ruzvaen** (sl. *angiome sénile, angiome nodulaire, angiome cerise, tache rubis, perle sanguine papuleuse, tétangiectasie papillaire*).

taches bleues ou ombrées ◇ **blue spots** ◇ **brizhennoù glas** Brizhennoù glas-sklent, direoliek, ferek pe moneizek, sezet war an divvorzhed, ar c'hof hag an daoustlez, diwar vrazhadoù *Phitirus inguinalis* (laou pafalek).

taches rosées lenticulaires ◇ **typhoid roseola** ◇ **brizhennoù damroz ferek** Dispuilhad kroc'hen naouus eus an derzhienn difoidel e-doug ar prantad a-wastad. An kez brizhennoù zo maelennoù arrott, a vent gant ur ferenn, rozwen, o steuziañ pa vez dardennet an amwiskadoù. Amliesel, emaint sezet war barzh uhel ar c'hof pe war ziaz ar brusk.

tachogramme ◇ **tachogram** ◇ **1 tizhwezd g. 2 takogram g.** 1 Lerc'hwezd ur grommenn dizh. 2 Krommenn dalm ar galon gounezet bennoz da zezrann stlenegel ar c'halonvarwezad kendalc'hek hag amkanet da erc'hwiliañ an arc'hwel godel.

tachographie ◇ **tachography** ◇ **tizhwezañ, takografiñ** Lerc'hwezañ ha muzuliañ tizh un heverenn.

tachyarythmie ◇ **tachyarrhythmia** ◇ **ustead-migorvez g.** Migorvez kevret gant kalonustead.

tachycardie ◇ **tachycardia** ◇ **ustead g. kalon, kalonustead** Herrekadur talm ar galon da ouzhpenn 100 poulzad dre vunud. Bez' e c'hell bezañ reollec'hiat pe dec'honet gant ur broudalf allec'hiat ezreol, kentezel, klomel, us-pe isklomel, uskofigel, kofigel.

tachycardie atriale ou auriculaire ◇ **atrial tachycardia** ◇ **kalonustead kentezel, kentezustead** Kalonustead a zo ar broudalf anezhañ er c'hentezioù, hennadus dre ur c'halonvarwezad naouus, dezhañ ur gorvez etre 150 ha 250 poulzad dre vunud hag o tarvezout dre varradoù grezvarrek.

tachycardie hissienne ◇ **His's bundle tachycardia** ◇ **kalonustead hisel** Seurtad kalonustead us-kofig diwar gwerederezh ur broudalf ezlec'hiat sezet e kef hordenn His.

tachycardie nodale ◇ **nodal tachycardia** ◇ **kalonustead klomel, klomustead** Kalonustead evodet eus ar c'hloim kentez-kofig.

tachycardie orthostatique ◇ **orthostatic tachycardia** ◇ **kalonustead warsavel** Kalonustead devoudet gant an tremen a-daol eus al loadur gourvez d'al loadur war sav.

tachycardie paroxystique ◇ **paroxysmal tachycardia** ◇ **kalonustead grezvarrek** Grezvarroù ustead kalon allec'hiat dezho un deroù trumm hag un diwez trumm pe argammedek, a orin kofigel pe us-kofig. — **kalonustead grezvarrek hennadek** : sl. *Bouveret : maladie de ~, tachycardie paroxystique supraventriculaire, tachycardie paroxystique nodale, tachycardie paroxystique essentielle*.

tachycardie sinusale ◇ **sinus tachycardia** ◇ **kalonustead godel, godustead** Herrekadur ar gorvez c'hodel bonan, dibaot kaer a-us da 150 lamm/min. War ar c'halonvarwezad, bonan eo stumm ar gwagennoù kentezel P hag an amzer tredanren kentez-kofig. An ustead godel a vez arsellet diouzh ar striv, e-kerz an derzhienn, an ustant simpatek, skortedoù ar galon, an amwadoù hag ar skoesusvorc'h.

tachycardie supraventriculaire ◇ **supraventricular tachycardia** ◇ **kalonustead us-kofig** Ustead kalon a zo e boent loc'hañ lec'hiet en argrec'h da gavaz kef an hordenn gentez-kofig (hordenn His). Digemmañ a reer : ar c'halonustead godel pe godustead, a zo an orin anezhañ er c'hloim god-kentez; ar gougren kentezel; ar c'halonustead kentezel pe kentezustead (anvet c'hoazh sistolustead kentezel), a-geñver gant un tolc'had kentez-kofig argemmus; ar c'halonustead kevree, anv rumm evit an usteadoù o loc'hañ eus ar c'hevre kentez-kofig (rannbarzhioù kentez-klom, klomel, klom-his, hisel, a-us d'ar c'havaz); ar c'halonustead dre wiengrehad kentez.

tachycardie ventriculaire ◇ **ventricular tachycardia** ◇ **kalonustead kofigel, kofigustead** Migorvez kofig o loc'hañ a-is da gavaz kef hordenn His. Bez' e c'hoarvez eus ur c'halonustead reoliek e-tro 180 lamm/min gant kemplezhioù kofigel ledan a rizh dreistsistol kofigek. Ar gorvez kentez a vez peurliesañ distrollet, nemet pa vez kilren. O tanzen ar c'hrehad kofigel marvus ez eo grevus kenan an erdeb.

tachycardie ventriculaire bidirectionnelle ◇ **bidirectional ventricular tachycardia** ◇ **kofigustead daouzurc'hadur** Seurtad kalonustead kofigel, naouus war ar c'halonvarwezad dre bebeiladur reoliek durc'hadur ar c'hemplezhioù kofigel, an ahelioù anezho o kevenebiñ etrezo eus ur c'horn war-dro 180°. Arsellet e vez ar peurliesañ e-kerz ur prederiadur digitek reñverek, pa vez darallet kalz ar c'halongaher.

tachycardie ventriculaire gauche idiopathique sensible au vérapamil ◇ **idiopathic sustained left ventricular tachycardia sensitive to verapamil** ◇ **kofigustead kleiz hennadek kizidik ouzh ar verapamil** Seurtad dibaot a gofigustead arstalek, grezvarrek, adfeilhus, hennadek, a rizh dale dehou gant ahel kleiz, kizidik ouzh ensinkladur engwazhiennel verapamil, dezhañ un erdeb azoù ent reol.

tachycardiomyopathie ◇ **tachycardia-induced myocardopathy** ◇ **kalongaherad g. usteadien, usteadkalongaherad, usteadkalongahernaoued** Skorted kalon darwazhus gant isfiñv bloc'hel ar c'hofig kleiz, o tarvezout war ur galon vonan agent, dec'honet gant un istead padek hag oc'h argizañ war-lerc'h ar steuzidigezh anezhañ.

tachygenèse ◇ **tachygenesis** ◇ **tarzhustead g.** Modelezh diorren ar rizehell ma vez delusket kentrat parennoù ar stummdarzh o tisoc'hañ abred gant saviadoù dieilto.

tachykinine ◇ **tachykinin** ◇ **takikinin** g. Kinin kevall, evel an danvezenn P hag ar VIP.

tachyphagie ◇ **tachyphagia** ◇ **debrustead** g. Realezh emvagañ doareet gant euvriñ buan ar boued, hag a-zianlen ur chaokerezh siek hag ur bregoazh.

tachyphémie ◇ **tachyphemia** ◇ **komzustead** g. Tuadur kleñvedel da vuanaat tamm ha tamm tead an distilh. Azon kleñved Parkinson pergen.

tachyphylaxie ◇ **tachyphylaxis** ◇ **primergost** g. (sl. *Besredka* : *méthode de* ~, *vaccination anti-anaphylactique*, *tachyphylaxie*).

tachypnée ◇ **tachypnoea** ◇ **analustead** g. Herregezh an analgor.

tachypsychie ◇ **tachypsychia** ◇ **bredustead** g. Herregezh ar bredarc'hwelerezh arsellet er mania.

tachysystolie ◇ **tachysystole** ◇ **sistolustead** g. Herregezh ezreol ar sistoloù kalon. — **sistolustead kentezel** : seurtad kalonustead diwar werederezh ezreol ur broudalf ezlec'hiat kentezel, disheñvel diouzh ar gougren. Argrezadoù ar c'hentezioù a ya lerc'h ouzh lerc'h diouzh ar c'hellusk reoliek eus 130 da 250 dre vunud hogos atav, dispartiet an eil re diouzh ar re all gant un diastol berrbad. War ar c'halonvarvezad ez eo direizh neuz ar wagenn P hag argemmus eo amzer an tredanren kentez-kofig. Ar peurliesañ, argrezadoù ar c'hentezioù a zelank ar c'hofigoù gant ur gorvez nebeutoc'h buan, rak bez' ez eus ent reol un tolc'had kentez-kofig 2/1 pe 3/1, war-gemm a-wechoù. Dalc'hus kenan eo ar migorvez-se : grevus eo pa zarvez e-kerz ar pistriadur digitekale pe ar c'halonanaezioù en ur stad arbadet. — **sistolustead kofigel** : stad rakkrehadel ar c'hofigoù (sl. *flutter*).

tactognosique ◇ **tactognosic** ◇ **stokdenaoudel** aa. A-zave d'ar stokdenaoud, eleze hennadiñ an traozoù dre ar stekiñ. — **leur stokdenaoudel** : rannbarzh pluskenn an empenn o c'hoarvezout eus treid an div droenn gitem kentañ.

tædium vitæ ◇ **tædium vitæ** Doñjer ouzh ar bevañ, dre enoe, ogvez pad, arsellet gant ar psikasteneion.

Tænia ◇ **Taenia** ◇ **Tænia** Genad preñved lurellek (an *teniaed*) eus urzh ar C'hestod, ennañ meur a spesad oc'h arvevañ ouzh an den pe al loened uhel. An eil re a gaver er stad oadour e kanol vezhur an den (*T. solium*, *T. saginata* oc'h erialañ da heul euvridigezh kig hoc'h damboazh evit an hini kentañ ha kig bevin evit an eil ; *Hymenolepis nana*, h.a.), hag ar re all zo arvevaded an den e rezh ekinokok pe hidatid, lankad dredeñ etre ar rizehell hag ar stad oadour (sl. *proglottis* ha *strobile*).

tæniase ou **tæniasis** ◇ **tæniasis** ◇ **teniaz** g. Erialerezh gant preñved eus ar genad *Tænia*, kevredet gant eleozinofil.

tænicide ◇ **taeniacide** ◇ **tenialazher** aa. & g. Gant ar perzh lazhañ ar preñved eus ar genad *Tænia*.

tænifuge ◇ **taenifuge** ◇ **teniaourzher** aa. & g. Amprevanourzher arveret ent arbennik ouzh ar preñved eus ar genad *Tænia*.

taie ◇ **leucoma**, **corneal opacity** ◇ **leukom** g., **glazenn** b., **gwennenn** b. Brizhenn gleizennel demer pe damvoull ar gornsaes war lerc'h un anaf daraezel pe foel. Hervez an tevder anezhi e vez graet *nivlad kornsae*, *albugo*, *leukom*, pe gant termenou hengounel : *gwennenn*, *glazenn*.

taille ◇ **1 size**, **stature** ◇ **1 savder** g. **2 benañ**, **grouanezvenañ** 1 Sav korf an den, eus sol an treid betek kern ar penn, ar gouzrec'h o vezañ el loadur war sav sonn. 2 Flañchañ, digeriñ un organ kleuz, ar c'hwezhegell pergen, war-benn eztennañ ar grouan pe ur c'horf estren a zo enni, ar peurliesañ dre an hent gougreuzel ha dibaot kaer dre an hent treuzampellennel pe garbedennel (boaziet da gentañ ha dilezet bremañ).

Takata-Ara : **réaction de** ~ ◇ **Takata-Ara test** ◇ **dazgwered** g. **Takata-Ara** Dazgwered dierc'hiñ ha dislivañ un dileizhenn sec'hdarzhad kloridenn vevargantek (HgCl₂) ha fuksin, pa azdoder gwadveiz klañvourion tizhet gant ar c'hirroz, gant ur skorted avu bras hag a-wechoù gant kankr an avu, pe pa azdoder liñvenn benn-kein klañvourion tizhet gant ar sifiliz nerval pe ar pilhonfo. An dazgwered-se ned eo ket spesadel, ha dispredet eo.

Takats : **épreuve de G. de** ~ ◇ **De Takats's test** ◇ **prouad g. De Takats** Prouad amkanet da ziournat steviadur hag andalc'h gwazhiennou don ar c'har pa vez teuc'helloù. O goullonderiñ a reer dre uhelaat ar c'har, ha goude e staler ur rolt damstardet dindan ar glin. Mar chom goustouet an teuc'helloù (ar gouzrec'h o vezañ en e sav), n'eus na steviadur nag andalc'h ar gwazhiennou don. Mar dardennont e c'houlenner ouzh ar gouziviad sevel 10 gwech war vegoù e dreid : koeñvet e chom an teuc'helloù pa vez steviet ar gwazhiennou don ; en degouezh kontrol e pladont. Ar c'hlañvour a chom neuze en e sav, ar rolt stalet en e lec'h : mar bez leuniet ar gwazhiennou en-dro ez eus ur skorted eus ar gwazhiennou don (sl. *Perthes* : *épreuve de* ~).

Takayashu : **maladie de** ~ ◇ **Takayashu's disease** ◇ **kleñved g. Takayashu** Anaez dibaot o tarvezout gant ar vaouez yaouank, naouus dre anforzh ar c'hefiou bras o tont eus gwareg an aortenn (karotidenn ha gwazhienn endan-drebez). An kez anforzh zo devoudet gant un holddalmerennfo hanrannel tanijennek a zo an anafoù anezhañ o souriñ war an ezsae, o tisoc'h a eil lank, gant an tromboz. Erzerc'haat a ra **ent klinikel** dre steuz pouz an div vrec'h hag ar c'harotidennou, dre ur "c'hlefiñ spanaus" eus an izili krec'h, ezwalioù diwar heskwad an empenn hag alies dre un dallder dre ferennlug pe heskwad al luc'hsae ; direizhoù all eus gwazhiad al luc'hsae zo bet ditouret : darvolloù, dasforzhadoù talmerenn-gwazhienn, gwadliñvoù. A-wechoù ez eus lec'hiadurioù talmerel all (isvolloù hag usvolloù an aortenn) ha diagentoù remmel ivez. **Dedreñ** a ra ar c'hleñved dre resmiadoù terzienn gant azoniad bevedel foel, dastroc'het gant prantadoù stabilaat hir. Natur an anaev-se zo anaevzet fall, ha marteze ez eo erwezh allergiek, ent dibarek ouzh ur c'heuziad strepokokel (sl. *gwazhiedfo allergek* Gl. *angéite allergique*). — Aozerion 'zo a ra anv eus *kleñved Martorell ha Fabre-Tersol* pa vank an dezverkoù strizh a-fad anafoù neuziadurel, oad ha rev, naouus da gleñved Takayashu. Da neuze, ouzhpenn ar c'hleñved-se, ez eo furmoù all eus azoniad gwarenn an aortenn (sl. *crosee aortique* : *syndrome de la* ~).

talalgie ◇ **talalgia** ◇ **seulost** b. Laur dalc'hus lec'hiet er seul.

- talc** ◇ **talc** ◇ **talk** g. Silikat magnezium naturel, gwenn, melein, arveret puzuilhet e stumm hue tanav war ar parzhioù mouest.
- talcege** ◇ ◇ **talkañ** Ebarzhñ talk e-barzh ul levr-genn war-benn devoadañ ur glenad etre an div feilhenn anezhañ (ar c'hrezoù, da skouer, Sz. *talce pleurodesis, krezennandiñvañ talk*).
- talcese** ◇ **talcosis** ◇ **talkoz** g. Analeuflegezh vicherel diwar dewentañ pell amzer uloc'h talk.
- Talfan** : **maladie de** ~ ◇ **Talfan disease** ◇ **kleñved** g. **Talfan** Melfo tredizhus kuñv ar moc'h diwar ur viruz eus ar genad *Enterovirus*, evel kleñved Teschen.
- talvenn-gant** : **épreuve** ~ ◇ **heel-knee test** ◇ **prouad** g. **sol-glin** Prouad nervoniell amkanet da andalañ stad kedren fiñvoù diarvenn an izili traoñ, anezhañ pediñ ar gouziviad, gourvezet a-gein ha serr e zaoulagad, da stekiñ buan ouzh glin un ezel gant sol an ezel all.
- talonnañ** ◇ **talcosis** ◇ **seulienn** b. Prest polegurañ o c'hronnañ ar seul.
- tambourin** ◇ **drumming** ◇ **taboulin** Kalvezder leuñviñ, anezhañ kiziata gant beg ar bizied.
- tampou** ◇ **1 pad 2 buffer** ◇ **1 tapon** g. **2 skurzer aa. & g. -ioù** 1 Tamm kotoñs, gazenn, h.a., arveret evit araezañ ar gwadkae pe spluiañ linvennoù pe borc'hadennoù. 2 Nep danvezenn azdodet d'ur dileizhenn en araez da skurziñ argemmoù ar pH anezhi, eleze d'e virout arstalek na pa vez ouzhpennet un drenkenn pe ur vazenn. Ar peurliesañ e vez an trevnadoù skurzer meskadoù ur vazenn wan gant un hal eus an kez bazenn diwar un drenkenn greñv pe, aliesoc'h c'hoazh, meskadoù un drenkenn wan gant un hal eus an kez drenkenn diwar ur vazenn greñv. Ar skurzer pouezusañ zo amparet, er plasma, gant an daouad $\text{CO}_3\text{H}_2 / \text{CO}_3\text{NaH}$: kediañ a ra gant nep trenkenn greñv oc'h enteñ er bevedeg, o furniñ ganti un hal hag oc'h erlec'hiañ outi an drenkenn wan dilaosket gant an dazgwered. An hemogloblin, ar proteinoù plasmatek, ar fosfatoù n'int nemet skurzerioù ambrougat.
- tampouenn** **cardiaque** ◇ **cardiac tamponade** ◇ **kouchadur** g. Amwask lemm ar galon dre ur fennad amgalonenn fonn ha /pe amparet buan, oc'h erzerc'hañ dre ur c'hoempad gant uheladur ar gwask gwazhiennel, lanvidigezh gwazhiennoù ar c'herc'henn ha pouz diac'hinek (sl. *Beck : triade de Claude* ~).
- tampouenn** ◇ **1 neutralization, buffering 2 dabbing** ◇ **1 skurziñ 2 taponañ** 1 Arverañ ur skurzer. 2 Pouezadennoù skañv gant gant un telt war ur c'horreenn groc'hen war-benn arloañ ur golc'had pe wadkaeñ.
- tampouenn** ◇ **packing, tampouenn** ◇ **kouchadur** g. Ebarzhñ en ur gavenn naturel pe gleñvedel taponoù stardet mat, war-benn herzel ouzh ur gwadliñv, gounit ur gwered enepfo pe kevaraezañ flakadur ar gavenn goude.
- tanapox** ◇ **tanapox** ◇ **tanapoks** g. Terzienn dispuihadel darreuziadek diwar ur poksviruz hag arsellet e traonienn ar stêr Tana e Kenia e 1957 ha 1962.
- Tangier** : **maladie de** ~ ◇ **Tangier disease** ◇ **kleñved** g. **Tangier** Kleñved familhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, naouus dre un ezvezañs hogos hollel eus an α -lipoproteinoù, un usvent eus an huegoù, un avufelc'husvent, ur c'holl eus ar gwrezaez hag un isteñv kaerel (kigennoù an dorn pergen).
- TAP** ◇ **Tick Anticoagulant Peptide** ◇ **TAP** Tallizherennoù Sz. *Tick Anticoagulant Peptide*, peptid enepkaoueledus douhennet eus halv an tarlak.
- tapéinocephalie** ◇ **tapeinocephaly** ◇ **sklatkloppenegzh** b. Kammneuziad ar c'hloppen a zo izel hag arblat a-saezh.
- tapetum** ◇ **tapetum** ◇ **tabezenn** b. 1 An *dabezenn* (Gl. *tapetum du corps calleux*) : nervwiennoù a loc'h eus talpenn ar c'horf karnek, o pallennañ speurioù kostezel ar gambr empenn kostezel. 2 An *dabezenn luc'hsae* (Gl. *tapetum nigrum*) : gwiskad livegat al luc'hsae.
- Tapia** : **syndrome de** ~ ◇ **Tapia's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Tapia** Seizi untu ar c'harloc'henn hag an teod, gant mouezhvirav ha bronlon, diwar dizhad an nervenn c'houdeodet hag ivez an nervenn dispis a-is d'ar gangrenn izelañ, en o zreug ezkloppenel.
- tapotement** ◇ **tapping** ◇ **stokata** Kalvezder leuñviñ, anezhañ ul lerc'hiad stokadennoù gorre pe zon, embreget gant ar bizied, pe gant ribl a-helmo an daouarn, pe gant ar meilh dorn (sl. *percussion*).
- TAR** : **syndrome** ~ ◇ **TAR syndrome** ◇ **azoniad** g. **TAR** Tallizherennoù ar Sz. *Thrombocytopenia Absent Radius* : teskad dibaot kammneuziadoù treuzkaset er mod aotozomek enkilek, anezhañ un olpladanoù spanaus hag adfeillus, o tevoudañ gwadliñvoù hag amwad ; un ezvezañs pe un iswe eus ar werzhid hag a-wechoù kammneuziadoù diseurt (spina bifida, pevaradezh Fallot, h.a.).
- tare** ◇ **defect** ◇ **namm** g. Ezreolder hêrezhel ar peurliesañ o leiaat ar barregezhioù korfel pe bredel.
- taré** ◇ **tainted** ◇ **nammed** g. **-idi** Gouzrec'h o kaout un namm.
- Targowla** : **réaction de** ~ ◇ **Targowla's reaction** ◇ **dazgwered** g. **Targowla** Dazgwered, dilezet hiviziken, arveret da zeznaouiñ ar sifiliz nervel : liñvenn benn-kein an nervahel mesket gant eliksir paregorek a zevoud ar malzenniñ.
- Targowla** : **syndrome de** ~ ◇ **Targowla syndrome** ◇ **azoniad** g. **Targowla** Seurtad nevroz daraezien, anezhañ barradoù uskoun fromel grezvarkek goulerc'hat, o tarvezout gant ezhangasidi ar c'hampoù bac'h.
- Tarlov** : **kyste de** ~ ◇ **Tarlov's cyst** ◇ **kist** g. **Tarlov** Kist oc'h evodiñ diwar ar perineuriom.
- tarsalgie** ◇ **tarsalgia** ◇ **soukost** b. Laur er souk.
- tarsalgie des adolescents** ◇ **spastic flatfoot** ◇ **soukost ar grennarded** Lavaret e vez ivez troad plat ezkamm diasavel (*laurus*) (Gl. *pied plat valgus statique (douloureux)*), anaez naouus dre flakadur ar volz troad gant ezkamm, kevret gant laurioù er souk ha klefiñ. Tarvezout a ra gant tud yaouank eus 15 da 20 vloaz, e dianlen ar c'herzhed pe al loadur war sav hirbad.

tarse ◇ **tarsus** ◇ **souk** g. Tolzennad 7 askorn oc'h ober atel adreñv an troad, oc'h amparañ ur volz ha stalet e div renkennad : war-ziadreñv an askorn fer, an askorn seul (o valirañ war-ziaraok a-us d'an diñseg), ar bulzuneg hag an tri askorn gennheñvel, kreizel, etreat ha kostezel.

tarse palpébral ◇ **tarsal plate** ◇ **tars** g. **ar valvenn** Tars ar valvenn zo amparet gant ul lavnenn wiad kenglenel doues gwevn (kollagen) ha dastennek (elastin), dezhañ ur stumm en araez da emazasaat ouzh krommder ar voull lagad, o tebarañ d'ar malvennoù reuter ha gwevnded, o kevaraezañ d'o c'hrizañ ha d'o ezriblañ. Enno emañ gwagrennoù o vorc'hañ un darn eus an daeroù.

tarsectomie ◇ **tarsectomy** ◇ **1 soukezvenañ** **2 tarsezvenañ** 1 Dazbidañ un pe lies askorn eus ar souk. 2 Dazbidañ tars ar valvenn.

tarsite ◇ **tarsitis** ◇ **1 soukfo** g. **2 tarsfo** g. 1 Tanijenn eskern ar souk. 2 Tanijenn tars ar valvenn.

tarsomégalie ◇ **tarsomegalia** ◇ **tarsomegaliezh** b. Direizh hêrezhel kresk eskern ar souk hag a-wechoù talpennoù un ezel traoñ hepken, eleze ur *miwe talpennel untu*. Nemedennek eo tizhad un ezel krec'h.

tarsoplastie ◇ **tarsoplasty** ◇ **1 soukatelviñ** **2 malvennatelviñ** 1 Nep gwezhiadenn da ratreañ an troad e par ar souk, doare askornbenañ dereizhañ. 2 sl. *bléfaroplastie, bléfaropoïèse*.

tarsorrhaphie ◇ **tarsorrhaphy** ◇ **tarsdlita** Dlita migern tars ar valvenn (sl. *bléfarorrhaphie*).

Tart-cell ◇ **Tart-cell** ◇ **kellig** b. **Tart** Kellig rouedek en he frotoplasm un ebarzhenn amparet gant ur graoñell fagokitet. Arsellet e vez, ent dibarek, gant ar c'houzrec'hed tizhet gant ul lupuz eritematus strewek.

tartre ◇ **tartar** ◇ **krestenn** b. Koc'hionad arzu gouzedet war c'horre an dent, e par ar gouzoug anezho pergen (sl. *plaque dentaire*).

Tarui : **maladie de ~** ◇ **Tarui's disease** ◇ **kleñved** g. **Tarui** Kahernaoued ganedigel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek dre zivig enzimatek a-fet fosfofruktokinaz, seurtad glikogenoz.

TATA : **boîte** ou **motif** ~ ◇ **TATA box** ◇ **boest** g. **TATA** Kemalenn 5 pe 7 bazenn, paot an adenin hag ar purin enno, daskavet war-dro 25 daouad bazennoù en argrec'h load deraouiñ treuzskrivadur lies genenn, en araez da festañ proteinoù reoliñ.

TATI ◇ **Tumour-Associated Trypsin Inhibitor** ◇ **TATI** g., **heuder** g. **an tripsin kevredet gant ur yoc'henn, HTKY** Polipeptid a zo ar gwad- hag an troazhvec'h anezhañ o kreskiñ e-kerz an ilgreizfoioù hag e-doug dedro lies yoc'henn goazhadel ha benevouriel (sl. *marqueurs tumoraux*).

taurine ◇ **taurine** ◇ **taorin** g. Amindrenkenn sulfurin keveilet en avu (evel ar glikin) gant an trenkennoù bestlel da amparañ halioù bestlel (sl. *acide biliaire*).

taurodontisme ◇ **taurodontism** ◇ **tarvzentegezh** b. Kammneuziad ar c'hildent, anezhañ un ushed eus ar gavenn gant ur rannadur pellek kenan eus gwrizioù an dent.

Taussig : **syndrome de ~** ◇ **Taussig's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Taussig** Kalonnaoued ganedigel nemedennek, naouus dre gevreded isvoll eus strizh an aortenn, un isvoll is-trapig aortek hag ur skorted aortek.

Taussig-Bing ou **Taussig-Bing-Pernkopf** : **syndrome de ~** ◇ **Taussig-Bing heart** or **syndrome** ◇ **azoniad** g. **Taussig-Bing** Kammneuziad kalon ganedigel naouus dre ur c'hammload eus an aortenn, o tout eus ar c'hofig dehou, dre ur bolc'hadur hag ur c'hleizload eus an dalmerenn skevent, a zo a-c'haoliad war ur c'hehentaed etre-kofigoù. Ent klinikel ez erzerc'h dre un dulaz muiik ha kontrat, gant ur sourr sistolek, ha dre ur geurgalonegezh skinlun diwar usvoll ar c'havennoù dehou hag an dalmerenn skevent.

taux ◇ **rate, ratio, level, amount** ◇ **1 feur** g. **2 bec'h** g. 1 Keñver daou gementad a un natur (e %, da skouer). 2 Kementad un danvezenn en ur meskad dre unanenn ec'honad (e g/l, µg/l, h.a. pe e mol/l, mmol/l, h.a. pe c'hoazh en UE/l, h.a.).

taxane ◇ **taxane** ◇ **taksan** g. Danvezenn bistriek deveret eus an ivin (*Taxus baccata*), arveret e prederiadur kankroù 'zo (vierez, bronn), pa 'z eo ur pistri eus ar werzhid vitotek (aroustaler ar c'horribelloù).

taxie ◇ **taxis** ◇ **trevn** g., **trevnegezh** b. Delanvad dedenn pe argas a-berzh danvezennoù pe anadennoù 'zo war ar proto-plasma. Ar gerioù-se a vez arveret ar peurliesañ gant ur rakger o resizañ orin an delanvad, da skouer *kimidrevn, kimidrevnegezh* pe *douardrevn, douardrevnegezh*, h.a.

taxis ◇ **taxis** ◇ **taksiz** g. Hollad ar c'hefleuñvadoù, anezho pouezadennoù hentennek gant an dorn amkanet da lakaat un aveleñn tagellet da enteñ e kavenn ar c'hof (diren un aveleñn). Dibaot kaer e vez bremañ an ennegadoù anezhañ. Arveret e vez ivez an kez termen evit direadur an amguldag.

taxon ◇ **taxon** ◇ **rummad** g. Live rummañ ar bevion, da skouer : ar riezad, ar skourrad, ar gevrennad, an urzhad, ar c'herentiad, an iskerentiad, ar meuriad, ar genad, an isgenad, ar spesad, ar seurtad, ar ouennad (sl. *biotaxie, taxinomie, taxonomie*).

Tay : **syndrome de ~** ◇ **Tay's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Tay** Kevredet iktioz ganedigel, trikotidistrofiezh, dilerc'h bred, isfrouezhusted, korreded hag a-wechoù luc'hgizidigezh, diwar un negez proteinoù puilh ar sulfur enno.

Taylor : **syndrome de ~** ◇ **azoniad** g. **Taylor** Azoniad familhel naouus dre gevreded ur malvennislink hag ur brelonk argreskus.

Tay-Sachs : **maladie de ~** ◇ **Tay-Sachs disease** ◇ **kleñved** g. **Tay-Sachs** Furm vugelel an diodezh steuzwelel familhel o tizhout ar Yuzevion poloniat a-zalc'h gant un usvec'h mono-sialo-gangliozid eus an nerveg dre zivig enzimatek (heksoaminidaz).

Deraouiñ a ra e tro an oad a 5 miz, o naouiñ dre un dic'hwitadur kefredel argreskus, un delaosk eus ar c'higennoù gant barradoù dasstrizhek hag usdamoug, ha goude ur reuter ezpluskennded, un dallder hag un usklev. Imbourc'h al lagad a lak war wel un takad ruz kerez war ar vrizhenn, gant pe hep isteñv gweleled. Echuñ a ra ar c'hleñved gant ar marv er fallezh e tro an oad a 2 pe 3 bloaz.

technétium ◇ **technetium** ◇ **teknetiom** g. Elfenn skinoberiek kalvezadel, arouez Tc, 43 an niverenn atom anezhi. An izotop pennañ zo an hini manstabil ^{99m}Tc, arveret er skingannluniñ evel tieller da erc'hwiliañ organoù 'zo (kalon, skoedenn, h.a.).

tegnopathie ◇ **occupational disease** ◇ **micherañez** g. Anv genadel ar c'hleñvedoù micherel.

tréogo-thalamique ◇ **syndrome** ~ ◇ ◇ **azoniad** g. **golo-derc'hvel** Azoniad nerverl diwar voukadur ar c'hrennempenn (troadoù an empenn) diwar dizhad talmerenn an diazpenñ, anezhañ : un ushunn don pe donoc'h, a-wechoù ur seizi eus ar c'homz, ur seizi daoudou eus nervenn loc'hañ al lagad (ptoziz, ezwariañ, mabusvoll peluzel) ha strafuilhoù an tant (ustantegezh a ruz parkinsoniek pe istantegezh ilpennel). Goude prantadoù hir a resmiadoù argizus e tedro etrezek tromboz trebadek talmerenn an diazpenñ (sl. *calotte* : *syndromes de la ~ (pédonculaire)*, *syndromes de la ~ méscéphalique*).

tégument ◇ **integument** ◇ **amwiskad** g. Gwiad o c'holeiñ un organ pe ur bevedeg.

Teichmann : **réaction de** ~ ◇ **Teichmann's test** ◇ **dazgwered** g. **Teichmann** Dazgwered arveret er vezekniezh lezennel da arglask bezañs gwad en takadoù dindan c'housesell, diazezet war drezufurmadur an hemoglobin e strinkenoù hemin (anvet *strinkenoù Teichmann*), goude danzeadur dre an drenkenn aketek berv ha diazhennadur.

Teicholz : **formule de** ~ ◇ **Teicholz's formula** ◇ **reollun** g. **Teicholz** Reollun kantouziat o kevaraezañ, er c'halonstenerluniñ TM, dezren ec'honad V ar c'hofig kleiz diwar vuzul e drezkiz D :

$$V = 7 \times D^3 / (2,4 + D) \text{ e mL, gant D e cm.}$$

teigne ◇ **tinea** ◇ **tagn** g. Kroc'henanez ar brigenn diwar ur foue kevret gant diwaoutad. Tri seurt zo : 1 an *tagn favozel* pe *favuz*; 2 an *tagn touzus*; 3 an *tagn lineiat*. Evit an *tagn asbestvanek* Alibert pe, gwell, gaoudagn asbestvanek (Sabouraud), anfoueel, zo naouus dre un drouskenn arwenn, sec'h, anezhi gourc'hennoù lavnennek o kaenañ ar blev, a denn d'ar poulc'hennoù asbest.

teinture ◇ **tincture** ◇ **tentur** g. Dileizhenn un pe lies danvezenn vezegel en un dileizher (dour, alkool, eter, amoniak) danzeet ent yen dre zileizhañ, meizhiañ pe trouezhañ.

télangiectasie ◇ **telangiectasia** ◇ **korrwazhiedusvoll** g. Usvoll ar c'horrwazhied kroc'hen, oc'h amparañ ur rouedad ruz fin diverkadus dre ar gwerennwaskañ. — *k. hêrezhel gwadliñvus* : sl. *angiomatose hémorragique familiale*, *angiomatose héréditaire hémorragique*, *maladie de Rendu-Osler*. — *k. begennel* : sl. *tache rubis*. — *k. gwenaennek* : angiokeratom, angiom kroc'hen bihan, garv ar gorre anezhañ, hiperkeratozek, sezet dreist holl war an daouarn, an dremm hag ar gousac'h.

téléassistance médicale ◇ **medical teleassistance** ◇ **pellwared** g. **mezegel** Gwazerezh gwarediñ a-bell o kevaraezañ d'un den bezañ lakaet e darempred dre ur c'halvadenn eeun (pellgehentiñ) gant tud ezholet pe ur gwazerezh difrae.

télé-autoradiographie ◇ ◇ **pellstafuniñ** Stafuniñ (aotaradiografiñ) kaset a-bell (sl. *autoradiographie*).

télécaésothérapie ◇ **telesesiumtherapy** ◇ **pellgeziomgurañ** Prederiañ a-bell ar yoc'hennoù yud diwar-bouez ar skinad ec'hodet gant ar c'heziom sinoberiek.

télécanthus ◇ **telecanthus** ◇ **telekantuz** g. Skaradur ezreol ankoù diabarzh al lagad.

téléchirurgie ◇ **telesurgery** ◇ **pellsurjianerezh** g. Gwezhiadenn surjaniel embreget a-bell ent douaregorel diouzh ar gouziviad gant ur mezeg diwar-bouez kalvezouriezhoù stlennegel ha pellgehentel.

téléclitoridie ◇ **telesurgery** ◇ **pellelligegezh** g. Kammneuziad a veze lakaet da giriek da "yenegezh" merc'hed 'zo, an ellig o vezañ re bell, a-hervez, diouzh digor ar gouin.

télécobalthérapie ou **télécobaltothérapie** ◇ **telecobalttherapy** ◇ **pellgobaltkurañ** Skingurañ diwar-bouez ar skinoù β ha γ ec'hodet gant un dolgenn gobalt 60, lec'hiet a-bell diouzh ar c'hlañvour.

télécuriethérapie ◇ **telecuriethérapie** ◇ **pellgurigurañ** Skingurañ diwar-bouez un pe lies mammenn skinoberiek lec'hiet pell pe belloc'h diouzh ar c'hlañvour.

télédiagnostic ◇ **tediagnosis** ◇ **pellzeznauoiñ** Treuzkas stlennadoù a-zivout ur gouziviad etre daou vezeg pell an eil diouzh egile, evit skoazellañ ar goullenner da gemer un disentez en un degouezh diaes.

télédiastole ◇ **telediastole** ◇ **dibenn-diaistol** g. Lankad diwezhañ diaistol ar galon.

télédiastolique ◇ **telediastolic** ◇ **dibenn-diaistol** aa., **dibenndiastolel** aa. A-zivout un anadenn o tremen e-kerz an dibenn-diaistol.

télégammathérapie ◇ **telegammathérapie** ◇ **pellc'hammagurañ** Arver yac'hadel ar skinoù γ, ec'hodet a-bell diouzh ar rannbarzh da gurañ.

télématique ◇ **telematic** ◇ **stlenngehentiñ**, **telematik** g. Hollad ar c'halvezerezhioù hag ar gwazerezhioù oc'h ober gant ar stlennegezh hag ar pellgehentiñ war un dro.

télé médecine ◇ **telemédecine** ◇ **pellvezekniezh** b. Kuzuliad (etre ur gouziviad hag ur mezeg) pe kenguzuliad (etre lies mezeg) mezegel graet a-bell.

téléencéphale ◇ **telencephalon** ◇ **peurempenn** g. Hollad an div hanterenn empenn, juntet gant o freilhoù ha kleuziet gant o c'hambrou kostezel.

- téléradiocinématographie** ◇ ◇ **pellskinfiñvuniñ** Dedalvezadur ar pellwel d'ar pellskinfiñvuniñ (sl. *radiocinematographie*).
- téléradiographie** ◇ **teleradiography** ◇ **pellskinluniñ** Skinluniñ, ma 'z eo ar vammenn skinoù X hag ar bevedeg da imbourc'hiñ, 1,50 m etrezo da nebeutañ d'o dispartiañ. En amveziadoù-se ez eo ar skinoù hogos kenstur ha dewerc'hañ a reer ur skeudenn en he ment natur.
- téléradiologie** ◇ **teleradiology** ◇ **pellskinouriezh** b. Pelldreuzkaserezh teulioù skeudennerezh mezegele e stern ar bellvezekniezh.
- téléradiophotographie** ◇ ◇ **pellskinluc'hskeudenniñ** Dedalvezadur ar pellwel d'ar skinluc'hskeudenniñ : ar skeudenn, paket gant ur c'hamera elektronek ha bannet war skramm ur skedamplaer pell diouzh ar c'hlañvour ha diouzh ar vammenn skinoù X, zo festet dre al luc'hskeudenniñ.
- téléradioscopie** ◇ **telefluoroscopia** ◇ **pellskinselliñ** Dedalvezadur ar pellwel d'ar skinselliñ : ar skeudenn, paket gant ur c'hamera elektronek, o vezañ bannet hag arsellet war ur skramm pell diouzh ar c'hlañvour ha diouzh ar vammenn skinoù X.
- téléradiothérapie** ◇ **teleröntgentherapie** ◇ **pellskingurañ** Arver yac'hadel ar skinoù X (pe skinoù ionaus all), pell (ouzhpenn 1,50 m) o mammenn diouzh ar rannbarzh skinataet.
- télésurveillance** ◇ **telemonitoring** ◇ **pellevshaat** Eveshaat a-bell un nebeut arventennoù mezegele (sl. *monitorage*).
- télé systole** ◇ **telesystole** ◇ **dibenn-sistol g. & aa.** Lankad diwezhañ sistol ar galon.
- téléthèse** ◇ ◇ **pellosod g.** Ardivink amkanet da seveniñ gwezhioù savelet dre araez arc'hadoù roet a-bell gant ur c'hlañvour tizhet gant nammoù loc'hadel grevus, diwar-bouez ar fiñvoù a chom gallus c'hoazh evitañ.
- Telford-Smith : doigt de ~** ◇ **Telford-Smith's finger** ◇ **biz g. Telford-Smith** Argrommed ar biz gwalenn arsellet da-geñver anaevioù diseurt (trizomiezh 21, kleñved Laurence-Moon-Biedl, h.a.).
- Tel Hashomer : syndrome de ~** ◇ **Tel Hashomer camptodactyly syndrome** ◇ **azoniad g. Tel Hashomer** Azoniad kammeuziadet dibaot o kevrediñ kammviziégezh, iswe kaherel, mineuz dremmel, askornviwe hag ezreolderioù plegoù ar palv.
- tellurique** ◇ **telluric** ◇ **talañvel aa.** A-zave d'an douar evel metoù. Gwechall e veze anv a *kleñvedoù talañvel, talañvgleñvedoù*, pa greded e teue an hadenn anezho eus an talañv, evel da skouer an *derzhienn dalañvel*, graet bremañ *paludegezh* anezhi.
- téломérase** ◇ **telomerase** ◇ **telomeraz g.** Enzim en araez da azeilañ an telomeroù.
- téломère** ◇ **telomere** ◇ **telomer g. -où** Dibenn kromozom, dezhañ perzhioù dibarek.
- téлоphase** ◇ **telophase** ◇ **telofaz g.** Pevare ha diwezhañ lankad eus emrannañ ar gellig, ma adkav kraoñell an div gellig nevez he luniadur boas (sl. *mitose*).
- tempérament** ◇ **temperament** ◇ **temz g.** Genezh dibarek — *hanc'henezh* — un hinienn o tisoc'h eus ar c'hengeñver spesadell etre he naousterioù neuziadurel ha bredel. Ent istorel, ar vezekniezh hipokratek a lakae kemm etre pevar zezm : gwadek, bestlek, nervek ha limfatek, eleze *gwadegezh, bestlegezh, nervegezh* ha *limfategezh*.
- temporal** ◇ **1 temporal** **2 temporal bone** ◇ **1 ~ividig, an ividig; a-ividig aa. 2 askorn g. ividig** 1 A-zave d'an ividig. 2 Askorn kostezel ar bolzpen.
- temporal : syndrome ~** ◇ **temporal syndrome** ◇ **azoniad g. an dolbezenn ividig** Hollad an azonioù devoudet gant tizhad an dolbezenn ividig eus an empenn. An hini pouezusañ zo un ankomz Wernicke, mard emañ a-gleiz an anaf; ouzhpenn e vez strafuilhoù skiantennel : bouzarded, ledanc'hwesa, kardangwel krec'h unsko pe, trezerc'hiou o tedreñ e rezh barradoù droukfell gant stad lederrizhañ (barradoù a-grog), e degouezh a anafoù eus an droenn lez-pennmarc'hig.
- temporale : crise ou épilepsie ~** ◇ **temporal lobe epilepsy** ◇ **droukfell g. ividig** (sl. *épilepsie psychomotrice* pe *temporale*).
- temporo-spatial** ◇ **temporospatial** ◇ **amzerel-egorel aa., egorel-amzerel, egoramzerel** A-zave d'an amzer ha d'an egor.
- ténalgie** ◇ **tenalgia** ◇ **stirennost b.** Laur en ur stirenn.
- tendinite** ou **ténosite** ◇ **tendinitis** ◇ **stirennfo g.** Tanienn ur stirenn.
- tendinopathie, ténopathie** ◇ **tenopathy** ◇ **stirennaoued g.** Nep kleñved ar stirennoù.
- tendon** ◇ **tendon** ◇ **stirenn b.** Penn stirek ur gigenn, o c'hoarvezout eus ur gwriad kenglenel a livrezh gwenn nakret, fetis ha gwewn, a gevaraez d'ar gigenn enlanañ war un askorn.
- ténectomie** ◇ **tenectomy** ◇ **stirennzevenañ** Gouvenañ darnel pe hollel ur stirenn.
- Ténéricutes** ◇ **Tenericutes** ◇ **Tenericutes** Bevedegoù anspeur, skourrad riezad ar prokarioted, a zo ennañ renkad ar Mollicutes.
- ténésme** ◇ **tenesmus** ◇ **tangrez g.** Dargrezad dasstrizhek laurus kelc'hstrishaer ar fraezh pe ar c'hwezhegell, kevret gant loskadurezh hag un ezhomm kaezhus ha diastal da gac'hout pe da droazhañ.
- ténodèse** ◇ **tenodesis** ◇ **tenodez g.** 1 Festañ ur stirenn roget pe skejet en e lec'h enlanañ. 2 Krouiñ ul lec'h enlanañ nevez war an askorn evit stirenn ur gigenn seizet ha skejet en amboaz-se.
- ténologie** ◇ **tenontology** ◇ **stirennoniezh b.** Rann a 'r gorfadurezh o plediñ gant ar stirennoù.
- ténolyse** ◇ **tenolysis** ◇ **stirennzezeniañ** Gwezh surjanel anezhañ dizalc'hediñ ur stirenn diouzh ar glenelloù ouzh he skoilhañ.

Tenon : capsule de ~ ◇ **Tenon's capsule** ◇ **gouinou** l. (g) ar **voull lagad** ; **pourc'had g. Tenon** PNA *vaginae bulbi*, stirsac oc'h amparañ ur gouin stirek o c'hronañ parzh adreñv, lersael, ar voull lagad, etrezo un tachad behinek (an *tachad etre-gouinou*), enni un igorenn evit nervenn ar gweled.

tenonien ◇ ◇ **tenonel** aa. A-zave da bourc'had Tenon.

tenonite ◇ **tenonitis** ◇ **tenonfo** g. Tanijenn gouinou ar voull lagad (sl. *capsulite*).

ténopexie ◇ **tenopexy** ◇ **stirennAanlenañ** Festañ — al liesañ dre grafaelañ — stirenn ur gigen. El lagadouriezh : festañ stirenoù kigennoù al lagad war-benn dereizhañ al loakrezezh.

ténoplastie ◇ **tenoplasty** ◇ **stirennatelviñ** Surjianerezh atelviñ war ar stirenn amkanet da erlec'hiañ outi un unanimboud pe un dafarenn azas.

ténorrhaphie ◇ **tenorrhaphy** ◇ **dlita stirenn, stirendlita** Krafaelañ ur stirenn bet skejet.

ténosynovite ◇ **tenosynovitis** ◇ **stirennirgennfo** g. Tanijenn ur stirenn hag an irgenn anezhi.

ténotome ◇ **tenotome** ◇ **tenotom** g. Ardivink amkanet da skejañ ur stirenn, da skouer stirenn ar seul da-geñver erougurañ an troad potin rakkamm.

ténotomie ◇ **tenotomy** ◇ **stirennenbenañ, tenotomiezh** b. Skejañ surjanel ur stirenn.

tensif ◇ **tensive** ◇ **dardennus** aa. Kevret gant ur santad stennded, da skouer ur *boan dardennus*.

tensioactif ◇ **tensioactive** ◇ **1 gorrewezhus** aa., **gorrewezher** aa. **2 gorrewezher** g. **-ioù** 1 En araez da leiaat tennder gorre al liñvenn ma emañ war zileizh. 2 Danvezenn c'horrewezher.

tension ◇ **1 pressure** **2 tension** ◇ **1 gwask** g. **2 tennder** g. **3 barr** g. 1 Nerzh dre unanenn c'horre e Pa (pascal) — 1 N/m^2 — . Er vezekniezh e vez graet gant un unanenn all evit dewerzhañ ar gwaskoù talmerel, sistolel, diastolel, enboull : ar mmHg, $1 \text{ mmHg} = 133,322 \text{ Pa}$. 2 An tennder zo un nerzh — dewerzhet e N enta — o werediñ e par gwiskadoù gorre al liñvennoù pe e par speurioù ur gavenn, evel nerzh herzel ouzh an aezhennoù pe al liñvennoù endalc'het enni. 3 Ar barr tredan — an tredanvarr — a vez dewerzhet e V (volt). Ar gremm dedaolet gant ur red tredan 1 A en un eilenn o kouezhañ eus 1 V zo par da $W = U \times I \times t = 1 \times 1 \times 1 = 1 \text{ J}$ (joule). Pezh a ro tu da zespizañ ar barr tredan evel ur gremmder tredanel : $U = W/It = W/Q$, da lavarout eo : $1 \text{ V} = 1 \text{ J} / 1 \text{ C}$ (C, coulomb unanenn dredanad).

tension artérielle ◇ **blood pressure** ◇ **gwask g. talmerel** Gwask ar gwad oc'h amredañ en talmerennoù. Uheloc'h eo er gwazhied bras hag er nes d'ar galon. War gemm emañ hervez prantadoù ar c'halongor, uhelaat a ra e-kerz ar sistol ha tremen dre un uc'hegenn (gwask sistolel pe uc'hek (sl. *pression artérielle*).

tension intermittente de l'épigastre ◇ **intermittent muscular contracture of the epigastrium** ◇ **dargrezad g. kigenell spanaennek an argreuzenn** Arouez kentrat kenan eus isvoll ar porzhier, anezhañ ur bos e-par parzh kleiz an argreuzenn. Ar c'hoefvadur-se, gwevn pe wevnoc'h ouzh an teuta, a steuz hag a zinod en-dro hep amdonnegad eus ar speur. Devoudet eo gant un andag tantek eus speur ar stomok.

tension superficielle ◇ **surface tension** ◇ **tennder g. gorre** Nerzh oc'h anadiñ e gwiskadoù gorre al liñvennoù a zeu dezho, dre berzh ur c'henstaladur dibarek eus o molekul, perzhioù leteñvel ouzh re ul lienenn wevn. An kez nerzh zo kenfeuriek ouzh σ ar *gwezhiader tennder gorre* (dre ledanviñ e lavarer "tennder gorre" hepken), naouus d'al liñvenn, dewerzhet e J.m^{-2} pe e N.m^{-1} , eleze e c'haller lavarout ez eo σ ur gremmder gorreel, pe un nerzhder regel.

tensionnel ◇ **tensional** ◇ **gwask, gwaskel** aa. A-zave d'ar gwask el liñvennoù bevel.

tente du cervelet ◇ **tensional** ◇ **telt** g. **an ilpenn** Parzh eus pilhonenn dev an empenn etre an empenn hag an ilpenn.

tentorial ◇ **tentorial** ◇ **telt, teltel** g. A-zave da delt an ilpenn, da skouer *us-telt* hag *is-telt*, lec'hiet a-us pe a-is da delt an ilpenn.

TEP ◇ **PET** ◇ **HEP, haenluniñ dre ec'hodiñ pozitron** ; **PET** (sl. *tomographie d'émission gamma*).

téphromalacie ◇ **tephromalacia** ◇ **louetgornvlodad** g. Boukadur kerniel ahel louet ar mel a-livenn, furm vevennet azoniad talmerenn araok al livenn, gant istevn kigennoù bihan an dorn.

téphromyélie ◇ **tephromyelitis** ◇ **louetgornfo** g. Tanijenn kerniel ahel louet ar mel a-livenn. Ne vez kavet an anaf-se er stad digevret nemet e par ar c'herniel araok ; pa zedro buan e ro tro da azoniad seizi livennel ar maban pe da seizi livennel lemm an oadour (dibaotoc'h) (sl. *poliomyélite antérieure*).

tératencéphalie ◇ **teratencephaly** ◇ **euzhempenngezh** b. Anvad rumm an euzhegezhioù o tizhout an empenn (ar c'hloppenn), an euzheg o vezañ *euzhempennek*, eleze un *euzhempenneg*.

tératoblastome ◇ **teratoblastoma** ◇ **teratoblastom** g. Teratom yud an dedro anezhañ, amparet a-zam pe a-bezh gant gwiadou andiforc'hek kenan a rizh krouell pe rizhellel.

tératogène ◇ **teratogen** ◇ **1 eusheiat** aa. **2 eusheiad** g. 1 O tec'han kammneuziadoù pe euzhegezhioù. 2 Danvezenn eusheiat.

tératogenèse, tératogénie ◇ **teratogen** ◇ **1 euzhardarzh** g. **2 eusheiaezh** b. 1 Ardardzh — argerzh furnidigezh — an euzhegezhioù. 2 Devouderezh euzheio pe euzhegezhioù, kleñvedel pe arnodel.

- tératologie** ◇ **teratology** ◇ **euzhegouriezh** b. Diskiblezh o plediñ gant an euzhegzhioù ha gant arbennoù gwariadoù an diorren.
- tératome** ◇ **teratoma** ◇ **teratom** g. Yoc'henn o c'hoarvezout eus gwiadoù kevarall diouzh gwiad an organ ma kreskont, dre ma teveront diwar gelligoù rizhellel aspadet er bevedeg (sl. *embryome*).
- tératopage** ◇ **teratopagus** ◇ **teratopag** g. Anvad genadel an euzheion daouat.
- tératospermie** ◇ **teratospermia** ◇ **euzhsperiegezh** b. Bezañs er sper eus spergelligoù niverus, ezreol o neuz.
- térébrant** ◇ **terebrant** ◇ **talarus** aa. A-zivout un anaf, un angreizh pergen, pe ul laur o vont don er gwiadoù, evel o talarañ.
- terme de la grossesse** ◇ **term of pregnancy** ◇ **termen** g. ar **vrazedded** Deiziad rakwelet evit dibenn ar vrazedded. Hervez an ABY, prantad o vont adalek an 37t betek ar 42t sizhunvezh vec'hiegi.
- terrain** ◇ **diathesis** ◇ **goudrevn** g. Teskad parennoù hilel, bevedel, h.a., en ervez da gevaraezañ dinodadur kleñvedoù 'zo.
- terreurs nocturnes** ◇ **night terrors** ◇ **spontoù** l. (g.) **noz** Hurlinkoù grizias gant ar bugel. Paouez a ra goude un hanter eurvezh, hep bezañ devoudet an dihun.
- Terrien** : **maladie de** ~ ◇ **Terrien's dystrophy** ◇ **kleñved** g. **Terrien** Kammneuziad dibaot ar gomsae, anezhi un usvoll eus he gwirimmenn, gorrek kenan an dedro anezhi hag oc'h erzerc'hañ dre un amstiwele eun. En ervez emañ da vezañ rouestlet gant sinekiezhioù araok pe gant enverlinkoù, ha zoken gant un treloezad er gomsae.
- Terrier** : **méthode de** ~ ◇ **Terrier's method** ◇ **hentenn** b. **Terrier** Kalvezder leuñviñ nes da hini Rabe oc'h ober gant an definiñval gouzañvat ha diastok fest mezal bizied al leuñvour war ar c'hroc'hen.
- Terrier** : **signe de** ~ ◇ **Terrier's sign** ◇ **arouez** b. **Terrier** Pa bouezer e lec'h resis ur fic'h talmerenn-gwazhienn gorreel e steuz an daskren hag ar sourr a veze klevet en o c'hreñvañ el lec'h-se.
- territoire lenticulo-optique** : **syndrome du** ~ ◇ ◇ **azoniad** g. **parzh adreñv ar pourc'had diabarzh** Seurtad azoniad Déjerine-Roussy, ma 'z eo garv an direizhoù loc'hadel hag ezvezant al laurioù.
- territoire thalamo-tubérien** : **syndrome du** ~ ◇ ◇ **azoniad** g. **an tiriad derc'hvel ha bos luduek** Seurtad azoniad Déjerine-Roussy, ma n'eo ket al laurioù taer kenan.
- Terson** : **syndrome de** ~ ◇ **Terson's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Terson** Gwadiñv ar gwereg hag al luc'hsae o vont kevret gant ar gwadiñvañ pilhon endan-gevniked, e-kerz dedro an darvolloù enkloupenel.
- Teschen** : **maladie de** ~ ◇ **Teschen disease** ◇ **kleñved** g. **Teschen** Kleñved bro-darreziat diwar ur viruz eus ar genad *Enterovirus* o wazhañ moc'h Kreizeuropa (Bohemia, Silesia), naouus dre azonioù nverel o tedreñ e tri lankad : trefiñv, seizi ar penn adreñv ha koma. Marvus e vez alies.
- test** ◇ **test** ◇ **prouad** g. Amprou, arnod, dazgwered kimiek pe erwez bevedel, h.a., arveret evit ditouriñ un devoud bennak, kleñved (deznauñ, diournat), lia, brazedded, barrezhioù korfel pe nauusterioù bredel un hinienn, h.a.
- testiculaires** : **hormones** ~ ◇ **testicular hormones** ◇ **hormonoù** l. (g.) **klidennel** Hormonoù borc'het gant gwagrenn entremezel ar glidenn. An hormon pennañ danzeet eo an testosterone, an androsteron o vezañ ur furm ezvevennañ. Ouzhpenn se e vorc'h ar glidenn ur c'hementad bihan a hormon estrogen ha ganzen a rafe ivez ar pregnenolon a weredfe un elfennoù an ac'had sperel (sl. *1 androgène* : *hormones* ~s ha *gonadostimuline*, *gonadotrophine*, *hormone gonadotrope*).
- testicule** ◇ **testis** ◇ **klidenn** b., **kell** b. Gwagrenn c'hanadel gourevel daoudañvat, o piaouañ arc'hwelioù war un dro ezvorc'hadel (sperbarañ) hag enborc'hadel (hormonoù klidennel).
- testicule** : **torsion du** ~ ◇ **torsion of spermatic cord** ◇ **gweadur** g. **funig ar sper** O tarvezout gant ar bugel, o tevoudañ laurioù grizias, ennegad groñs d'oberata diwar zifrae.
- testicule féminisant** : **syndrome du** ~ ◇ **testicular feminization syndrome**, **Morris's syndrome** ◇ **azoniad** g. ar **glidenn venevekaus** Furm c'haouerevegezh c'hourevel, gant arouezioù revel diavaez neuziet ent venevek ha doareoù neuziadurel ur venev, ezvezañs an organoù ganadel benevel diabarzh ha bezañs klidennoù a rizeh ankaezourek loet er muzelloù bras pe e kanol ar varlenn, pe c'hoazh er c'hof. Emañ an kez azoniad e dalc'h un ankizidigezh eus ar organoù buk ouzh an hormonoù gourevel.
- testicule irritable** ◇ **Cooper's irritable testicle** ◇ **klidenn** b. **hegeuziek** Nervost hennadek ur glidenn, hep anaf anat.
- testicule-mammaire** : **syndrome** ~ ◇ ◇ **azoniad** g. **klidenn-divvronn** Azoniad arsellet e korioepiteliomou 'zo a 'r glidenn, naouus dre uestev an divvronn ha bezañs prolan en troazh diwar vorc'hidigezh ar gwiad korion-torzhienn.
- testostérone** ◇ **testosterone** ◇ **testosteron** g. Hormon gourevel borc'het gant kelligoù Leydig ar glidenn (kelligoù gwagrenn entremezel ar glidenn) hag a-cilrenk gant ar gaenuslounezhenn hag ar vierez. Pa vez diounezet d'ar gourev ankaezourek e tinod an arouezioù revel gourevel (sl. *1 androgène* : *hormones* ~s).
- testotoxicose** ◇ **testotoxicosis** ◇ **testotoksikoz** g. Furm familhel a gaezoueregezh kenrat, ent-dizalc'h diouzh ar gonadotropin, arsellet gant ar c'hourevel.
- tétanie** ◇ **tetany** ◇ **tetaniezh** b. Azoniad arsellet dreist holl gant ar bugel yaouank, dibaotoc'h gant ar venev, naouus dre varradoù dargrezadoù kigennele, lec'hiet dreist holl en eizhaennoù an izili, en ervez d'en em astenn d'an izili hag a-wechoù d'ar c'hof. Mar c'hoarvez an dargrezadoù dre resmiadoù, e c'haller o devoudañ ivez ent danzeadel dre amwaskañ gwazhied ha nervernoù an izili tizhet, o lakaat war-wel evel-se ur stad padek a spasmodiezh. Darvezout a ra an detaniezh er gwadisevec'hioù kalkiom, gant

digresk er gwad eus ar c'halkiom ionaet (arskoedisvorc'hioù, negezioù ha misугоù kalkiom) e-doug an alkalozioù (c'hweladoù) ha poreoù zo.

tétaniforme ◇ ◇ **tetanozvanek** aa. Heñvel ouzh an tetanoz.

tétanique ◇ **tetanic** ◇ **1 tetanek** aa., **tetanozel**, **tétanoz 2 tetanek**, **tetaniezhel**, **tétaniezh** 1 A-zave d'an tetanoz. 2 A-zave d'an detaniezh.

NOTENN : Br *tetane*k a vez arveret er ster ledan, eleze o taveñ da *tetanoz*, *tetaniezh*, *tetane*kaat. Diouzh ret e teverer dre an hent du-mañ diwar *tetanoz*, *tetaniezh* : *tetanozel*, *tetaniezhel*; hogen kenkoulz tremen hep deverañ pa vez tu; Br. *vaksin(añ) eneptetanoz*, Br. *barrad tetaniezh* (Gl. *crise tétanique*).

tétanisation ◇ **tetanization** ◇ **tetane**kaat Merkañ a ra an termen-se an dargrezad pad o c'hoarvezout gant ar c'higennoù, forzh pe orin a ve dezhañ, kleñvedel pe galvezadel (da skouer dec'hant gant ur red tredan arloet ouzh ar c'haer).

tétanos ◇ **tetanus** ◇ **tetanoz** g. Pore grevus diwar bazhell Nicolaëer (*Clostridium tetani*) a ento er bevedeg e par ur gouli, leiek zoken, war-lerc'h bezañ bet e diastok an douar ma c'hell ar vazhell dreistbevañ pell. Devoudet eo ar c'hleñved gant an toksin nervvezhus danzeet a-fonn gant an kez bazhell, o kregiñ gant dargrezadoù tantek laurus er c'higennoù chageller (genglav), a aloub da heul an askil, ar c'hef hag an izili, kevret gant erzerc'hadoù hollek : terzhienn uhel, kalonustead, buanadur an anal. Seizi ar c'higennoù analañ a c'hourlaka alies ar gwenterezh kalvezadel. Ar gounervezh a bad eus 4 devezh da 3 sizhunvezh, hervez natur, lec'hiadur hag astenn ar gouli deroù. Ar vaksinadur reizhiadek a bourchas ur gwarezerezh diogel (sl. *emprothotonos*; *Rose* : *tétanos céphalique* ou *hydrophobique de* ~; *Larrey* : *tétanos dysphagique de* ~).

tétanospasmine ◇ **tétanospasmin** ◇ **tetanospasmin** g. Nervdoksins spesadel danzeet gant *Clostridium tetani*. Adalek ar gouli, ma chom ar vazhell, enstrewiñ a ra an toksin er c'higennoù, ha goude er bevedeg a-bezh dre ar forzhioù limf, en ur araokaat a-hed an nervennoù evit festañ en nervgreizennoù.

tétartanopie ◇ **tetartanopia** ◇ **tetartanopiezh** b. Ur rizh daoulivwel dibaot kaer ma ne verz ar gouziviad nemet al livioù ruz ha gwer, gant al livioù glas ha melen gwelet evel louet.

tétartanopsie ◇ **tetartanopsia** ◇ **tetartanopsiezh** b. Kardangwel (sl. *hémianopsie en quadrant*).

tête ◇ **head** ◇ **penn** g. 1 Rann uhelañ korf an den, kenereet ouzh ar brusk dre ar gouzoug. Ennañ emañ an empenn, organoù pennañ ar skiantennoù ha parzh uhelañ ar forzhioù analañ ha koazhañ. Rannañ a reer ar penn e daou : ar c'hlopenn hag an dremm. 2 Dre astenn ster, eizhaenn organoù diseurt.

tête de Méduse ◇ **Medusa's head** ◇ **penn g. Medusa** 1 Neuz diwar frankadur ar rouedad wazhiennoù dangroc'heneh troveg en uswask porzhel, arsellet a-wechoù e kirroz Laennec. 2 Hervez Lermoyez, frankadur gwazhiennoù ar brigenn hag an tal, diwar skoilhadur an amred enkloupennele e tromboflebit rouedad gwazhiennoù an empenn. Ur furn dibaot a zarvoud gwazhiedel empenn eo.

tétracycline ◇ **tetracycline** ◇ **tetrakiklin** g. Bevastaler deveret eus ar c'hlorotetrakiklin dre lemel un atomenn glor. Douhennet eo eus tiñvadennoù *Streptomyces albo-niger*, dezhañ an un perzhioù hag ar c'hlorotetrakiklin hag an oksitetrakiklin.

tétracyclines ◇ **tetracyclines** ◇ **tetrakiklineier** l. (g.) Kerentiad bevastaleroù, ennañ an *tetrakiklineier naturel* (klortetrakiklin, oksitetrakiklin, tetrakiklin, tetrakiklin bazenn, h.a.) hag an *tetrakiklineier damgevanaoz* (doksikiklin, da skouer). Ar bevastaleroù-se a harz kresk an hadennoù dre skoilhañ ouzh lenn an hilvoneg e ribozomoù ar bakteri hag ouzh dilaosk an amindrenkennoù rekis da enaozañ protein ar garveion.

tétragène ou **tétracoque** ◇ **Micrococcus tetragenus** ◇ **tetrakok** s. Mikrokok an halv — *Micrococcus tetragenus* — bodet dre bevar.

tétragonosomie ◇ ◇ **pevargonozomiezh** b. Seurtad kleñved diwar c'housoevad kromozomel, naous dre vezañs pevar c'hromozom revel (pe gonozom) e-barzh kelligoù ar soma (sl. *polygonosomie* ha *caryotype*).

tétrahydroaldostérone ◇ **tetrahydroaldosterone** ◇ **tetrahydroaldosteron** g. Aozad disoc'h ec'haoz an aldosteron, ez-vevennet en troazh.

tétrahydrocannabinol ◇ **tetrahydrocannabinol** ◇ **tetrahidrokanabinol** g. Kedaozenn bennañ ar c'hanab indian (sl. *cannabinolide* ha *cannabis* : *composants du* ~).

tétraploïde ◇ **tetraploid** ◇ **tetraploïdel** aa. A-zivout luniadoù ezreol zo eus kelligoù ar soma, enno — an daou c'hamet orin o vezañ chomet diploïdel e dianlen un ezreolder eus ar meioz — *4n* kromozom e-lec'h *2n*, niver bonan. Mar deu an daou c'hamet orin eus kerent a un spesad, ez eo an engehentad *aototetraploïdel*; mar deu ar gametoù eus kerent a spesadoù kevarall, ez eo an engehentad *allotetraploïdel* (pe *amfidiploïdel*). Allo- ha aototetraploïdiezh zo degouezhioù dibarek a allo- hag aotopoliploïdiezh (sl. *polyploïdie*).

tétrasomie ◇ **tetrasomy** ◇ **tetrazomiezh** b. Kleñved diwar c'housoevad kromozomel dibaot kenan, naous dre vezañs daou kromozom dreistniver war un daouad kromozom, somatek pe revel (tetrazomiezh XXXX pe XXXY); ar c'hariotip zo ennañ 48 kromozom e-lec'h 46. Leteñvel eo erzerc'hadoù klinikel an tetrazomiezh ouzh re ar bentazomiezh.

textilome ◇ **textiloma** ◇ **tekstilom** g. Korf estren gauyoc'hennel diwar un telt pe un amgeden lezet er bevedeg war-lerc'h ur wezhiadenn surjianeel.

thalamique ◇ **thalamic** ◇ **-derc'hvel**, **derc'hvelel** aa. A-zivout an derc'hvel.

thalamiques ou **sous-thalamiques** : **syndromes** ~ ◇ **thalamic syndromes** ◇ **azoniadoù** l. (g.) **derc'hvelel** pe **endan-derc'hvel** Azoniadoù navel diwar un anaf eus an derc'hvel hag eus ar rannbarzh danlec'hiet, anezho : an azoniadoù *kostezel* (azoniad derc'hvelel klasel pe azoniad Déjerine-Roussy, azoniad eiltuat ar gronn ruz, azoniad perenneg ar gouzerc'hvel); an azoniad *krennempennel*; an azoniad *kreizer* oc'h erzerc'haat ur boukadur kreizer ha daoudou eus an derc'hvel dre dizhad talmerenn an diazpenn : mard eo ledek an kez boukadur e tinod un azoniad golo-derc'hvel; mard eo lec'hiekoc'h e tec'han an envedi derc'hvelel gant anfiñv, ankewant, bloc'heilañ, migoun ha digasted kantaezel (sl. 1 *négligence motrice*).

thalamotomie ◇ **thalamotomy** ◇ **derc'hvelenbenañ** Gwezh surjanel distrujus, oc'h ober gant kalvezderioù ec'hondrevnadel, amkanet da freuzañ kennaskoù navel 'zo e-par an derc'hvel, dre dredangaouledañ pe diwar-bouez ar yenion (*yezerc'hvelenbenañ*). Dewerc'het eo war-benn skañvaat laurioù kilvers pe dereizhañ strafuilhoù ampikernennek 'zo.

thalamus ◇ **thalamus** ◇ **derc'hvel** g. Gronn ec'honek daoudañvat eus an treuzpenn, oc'h amparañ speur kostezel an trede kambr. Unan eus gronnoù an diaz eo, o talvezout da azhenter an hentoù santout skiantennel war-du pluskenn an empenn.

thalassémie ◇ **thalassaemia** ◇ **moramwad** g., **talasemiezh** b. Ezreolder hêrezhel enaoz an hemogloblin, anezhañ ur skorted eus enaoz un pe lies digorvell globin hag ur reñver eus enaoz an digorvelloù all. Kiriek eo an anaez d'ur ruzvibar gant arzhelañ enmele hag ur gwadloezañ enien. A-geñver gant ruz an digorvelloù a ra diouer e lakaer kemm etre ar β-moramwadoù (paot gant ar Greizdouaregiz), ar β-δ-moramwadoù hag an α-moramwadoù. A-geñver gant grevusted an daolenn glinikel e lakaer kemm etre ar moramwadoù muiek (a dizh ar c'houzrec'hed unreek, pe kleñved Cooley) hag ar moramwadoù leiek (a dizh ar c'houzrec'hed allreek).

thalassothérapie ◇ **thalassotherapy** ◇ **morgurañ** Arver yac'hadel an dour mor, al lec'hid, ar bezhin hag an hin. Ur vorgur a vez graet en ur vordrev.

thalidomide ◇ **thalidomide** ◇ **talidomid** g. Imid an drenkenn N-ftalil-glutamek, kediad dezhañ perzhioù huneiat. E tro 1960, euvridigezh an danvezenn eusheiat-se gant merc'hed dougerez 'zo zo bet e devoud kammneuziadoù grevus gant ar grouell (krak-ezelegezh). En arbenn eus ar perzhioù hangaeastaler anezhañ, an talidomid a vez erskrivet e prederiadur al lovrezh. Anavezet eo ivez evit ar c'hant bennak a gennevidadoù dec'hant gantañ.

thalle ◇ **thallus** ◇ **tall** g. Hollad ar benvegad struzhel ha genel ar plantoù izelañ (foue, felu) n'o devez na gwrizioù, na garenn, na delioù.

thallium ◇ **thallium** ◇ **talliom** g. Metal bouk glas-gwenn, a niverenn atom 81, a dolz mol atom 204,37 hag a arouez Tl. An halioù diwarnañ zo pistriek kenan, reoù 'zo anezho a veze arveret gwechall evit o gwered divleviñ. An izotop skinoberiek 201Tl a vez arveret evit skingannluniñ ar c'halongaher.

thallophyte ◇ **thallophyte** ◇ **tallofit** g. Bevedeg lieskellig, ar benvegad struzhel anezhañ o c'hoarvezout eus un tall.

thanatologie ◇ **thanatology** ◇ **trankouriezh** b. 1 Er gevredadouriezh, studi arvezioù bevoniell ha kevredadel ar marv. 2 Er vezekniezh, studi lezenvezegel amveziadoù ar marv, evel da skouer deiziad ar marv, deznaou, an anadennoù kelanel, h.a.

thanatophobie ◇ **thanatophobia** ◇ **marvarur** g. Aon mac'hennak rak ar marv.

thanatopraxie ◇ **thanatopraxy** ◇ **kelanderc'hañ** Gwezhiadoù renet war ur c'helan evit ampellañ deroù an ec'haozidigezh ha daskoriñ dezhañ un neuz nesoc'h d'ar bev. Ar c'helanderc'hour a labour e unan-penn ar peurliesañ, en ur c'himiati, pe e ti an hini aet da anaon. An diplom kelanderc'houriezh a vez debaret war-lerc'h un arnodenn renet da wiriañ an anaoudegezhioù damkanel ha pleustrel.

thébaïne ◇ **thebaïne** ◇ **tebaïn** g. Alkaloid strinkennek pistriek douhennet eus an opiom.

thébaïque ◇ **thebaïc** ◇ **tebaek** aa. A-zivout an opiom pe oc'h enderc'hel opiom.

thécal ◇ **thecal** ◇ **toagel** aa. A-zivout un toag, ent dibarek toag bolc'henn ar vierrez.

thécome ◇ **thecoma** ◇ **tekomp** g. Yoc'henn guñv ar vierrez, o tinodiñ ar peurliesañ goude ar paouez mizioù, amparet gant kelligoù an toag, a vent etre pe vihan, en ervez da zanken estrogenoù, en araez da zevoudañ un uswe eus an enkrozhenn ha krozhwadiñvoù.

theile : **sinus (transverse) de** ~ ◇ **sinus of the pericardium** ◇ **god** g. **treuz an amgalonenn** Bogod kavenn an amgalonenn etre funelloù talmerel ha gwazhiennel a 'r galon.

théisme ◇ **theism** ◇ **teegezh** b. Pistriadur dre an te (sl. *caféine, théine*).

théialgie ◇ **thelialgia** ◇ **begbronnost** b. Gwiridigezh beg ar vronn.

thélarche ◇ **thelarche** ◇ **bronnekadur** g., **telark** g. deroù diorreadur kaezougezhel an divronn.

thélite ◇ **thelitis** ◇ **begbronnfo** g. Tanijenn ar beg bronn.

thélorragie ◇ **thelorrhagia** ◇ **begbronnwadiñv** g. Gwadiñv e par ar beg bronn.

thélotisme ◇ **thelotism** ◇ **begbronnod** g., **telotegezh** b. Ar begoù bronn o vont war-raok diwar argrezadur kigennoù ar rodennoù.

thénar : **éminence** ~ ◇ **thenar eminence** ◇ **gourbozenn** b. Balir kigennek hirvoan loet war barzh krec'h-diavaez palv an dorn, anezhañ kigennoù en erdu ar meud.

théobromine ◇ **theobromine** ◇ **teobromin** g. 3,7-dimetilksantin, alkaloid douhennet eus greun an *Theobroma cacao* ha kevanaozet ivez diwar ar ksantin. Ur poultr gwenn strinkennek eo, dezhañ perzhioù troazhusorc'hus, gwazhiedfrankaus ha kalonusretis.

théophylline ◇ **theophylline** ◇ **teofillin** g. 1,3-dimetilksantin, alkaloid pennañ an delioù te, izomer an teobromin, troazh-usvorc'hus, gwazhiedfrankaus kurunereel ha bronkezfrankaus, arveret e prederiadur an astma. Ur gwered fraouaat war an nerveg kreiz zo d'an teofillin ivez.

thèque ◇ **theca** ◇ **toag** g. Goloenn genglenel o c'hronnañ bolc'hennoù azv ar vierez (sl. *Slavjansky : membrane de* ~).

thérapeute ◇ **therapist** ◇ **kurer** g. -ion Mezeg pe den oc'h embreger ur vicher lezvezegel, oc'h ober gant araezioù evit pareañ pe, da nebeutañ, aesaat d'ar glañvourion.

thérapeutique ◇ **1 therapeutic 2 therapeutics 3 therapy** ◇ **1 yac'hadel aa., kuradel aa. 2 yac'hadouriezh b. 3 yac'hadurezh b. ; yac'haat, mezegañ, prederiañ, kurañ** 1 A-zivout ar yac'haat, prederiadur ar c'hleñvedoù. 2 Diskiblezh o plediñ gant prederiadur ar c'hleñvedoù, eleze an araezioù liael, surjaniel pe all amkanet da bareañ pe skañvaat ar glañvourion. 3 Hollad an araezioù dibabet da brederiañ ur c'hleñved. A se an termenou liesseurt (gant an deveradoù anezho : *mezegadur, prederiadur*), pa dalvezont holl : “ober war-dro, klevout diouzh, plediñ gant” un den klañv. An hini diwezhañ a dalvez ivez en deveradoù evel lostger : *kouronkkurañ, gwaskkurañ, gwadvezkurañ, bredkurañ, kobaltkurañ*

thérapie cellulaire ◇ **cell therapy** ◇ **kellgurañ** Prederiadur atav dindan arnod, anezhañ erlec'hiañ ouzh kelligoù distrujet (dre goshaat pe varvennañ) kelligoù nevez erlamet diouzh ar gouzrec'h e unan pe gounezet dre gloniñ.

thérapie cognitive ◇ **cognitive therapy** ◇ **naoudgurañ** Seurtad ersavouriezh vezegel amkanet da zaskemmañ, gant gouzrec'hed diwasket hag ankeniet, kredennoù hag emzalc'hioù kamm.

thérapie comportementale ◇ **behavior therapy** ◇ **ersavgurañ, ersavouriezh b. vezegel** Seurtad bredkurañ diazezet war an dezalc'h hag an darblegañ, amkanet da zaskemmañ realoù anazas, e degouezh a neuroz arurel pe mac'hennel pergen.

thériaque ◇ **theriaca** ◇ **triakl** g. -où Angevezh opiomek kemplezh a c'hoarveze eus ur c'hwegont bennak a zanvezennoù, an delun anezhañ o vezañ deveret eus hini ar *mitridat*. En deroù e tremene da hollzigontamm evit ar binimoù, ha goude evit ar pistrion dre vras, hag a-benn ar fin o tont da vezañ un doare peurlouzoù, a-ziavaez pe a-ziabarzh. Arveret e veze betek dibenn an 19vet kantved, pe-dost.

thermalisme ◇ **thermatology** ◇ **havouriezh** g. Hollad an araezioù mezegel, kevredadel, h.a., engwezhiet evit arver yac'hadel an dourioù melar. Komzet e vez a *havgur; havdrev; fank havel, mezekniezh havel*.

thermes ◇ **thermal baths** ◇ **havdi** g., **haverezh** b. Diazevadur amkanet da arver yac'hadel an dourioù havel tomm.

thermite ◇ **kroc'henad** g. **gwrezel, gwrezgroc'henad** g. Kroc'henad diwar wered ar wrez.

thermo-algésique ◇ **thermoalgésic** ◇ **gwrezel-laurel** aa. A-zave d'ar wrez ha d'al laur war un dro.

thermo-analgésie ou **thermo-anesthésie** ◇ **thermo-analgésia** ◇ **gwrezdieraeziñ** Lemel ar gwrezeraeziñ reol.

thermocautère ◇ **thermocautery** ◇ **loskezer** g. -ioù Ardivink a dalvez da ezañ diwar-bouez ar wrez, anezhañ ur c'harenn gleuz e platin tommet kann dre ur redenn aezhenn (meskad aer ha burezhioù hidrokarbonek) o leskiñ.

thermocoagulation ◇ **thermocoagulation** ◇ **gwrezkaoulediñ** Araezad oberatael amkanet da gaoulediñ ar gwiadoù dre ar wrez ganet gant ur red tredan uheldalm (sl. *électrocoagulation* ha *radiofréquence*).

thermodilution ◇ **thermodilution** ◇ **dizolc'hiñ ur merker dre wrez** Dizolc'hiñ ur merker dre wrez (dileizhad yenaet). Studi ar grommenn dizolc'hiñ a gvararez muzuliañ ec'hongas ar galon (sl. *débit cardiaque*).

thermodynamique ◇ **thermodynamics** ◇ **gwreznerzhoniezh** b. Diskiblezh, skour eus ar fizik, o plediñ gant an eskemmoù gremm.

thermo-esthésie ◇ **thermoaesthesia** ◇ **gwrezeraeziñ** Kizidigezh ouzh ar wrez.

thermogenèse ◇ **thermogenesis** ◇ **gwrezparañ** Dedaoliñ gwrez gant ar bevedeg loenel, amkanet da zerc'hel arstalek ar gwrezverk diabarzh (loened emwrezat pe gwrezreoler), daoust da argemmoù ar metoù.

thermographie ◇ **thermography** ◇ **gwrezwezañ, termografiñ** Hentenn oc'h arverañ ar skinad danruz ec'hodet gant ur gouzrec'h ent naturel. Seul uheloc'h eo gwrezverk un tachad eus ar c'horf, seul vrasoc'h an ec'hodad anezhañ. Ar gwrezwezañ a gvararez dinoiñ tachadoù tizhet gant un anaезд, o vezañ ma 'z eo uheloc'h ar gwrezverk en o far. Seurt hentenn a vez arveret evit ar bronnanaezioù pergen, ent dibarek yoc'hennoù gwagrenn ar vronn.

thermokératoplastie ◇ **thermokeratoplasty** ◇ **gwrezkornsaeateliñ** Azneuziañ ar gornsae diwar-bouez al laser, amkanet da brederiañ an usstiuel (sl. *kératoplastie*).

thermolabile ◇ **thermolabile** ◇ **gwrezhestez** aa. Daskemmadus pe daralladus dre wered ur c'hresk gwrezverk, evel ar gwadveizoù a goll o gwezhusted en ur gwrezverk 55-56 °C pe c'hoazh an enzimoù a zo gwrezhestez an holl anezho.

thermolyse ◇ **thermolysis** ◇ **gwrezsteuz** g. Koll gwrez gant ar bevedeg, dre skinañ, kendougen, c'hweziñ, h.a.

thermoparésésie ◇ **thermoparaesthesia** ◇ **gwrezvieraez** g. Strafuilh ar gwrezeraeziñ.

thermophile ◇ **thermophilic** ◇ **gwrezgar** aa. A-zivout ar bevion (struzhennoù, loened, bakteri) o vevañ en ur gavael etre 40 °C ha 70 °C ha dezho un diorreadur gwellek en ur gavael etre 50 °C ha 55 °C (a-wechoù betek 83 °C).

thermophobie ◇ **thermophobia** ◇ **gwrezkaz** g. Aon kleñvedel rak ar wrez, anglevet gant klañvourion 'zo (skoedusvorc'h-eion), p'o devez atav ar sandad a dommder.

- thermorégulation** ◇ **thermoregulation** ◇ **gwrezarouleviñ** Arouleviñ kefleuniet gant an nerveg o tougen da zerc'hel ar gwrezverk kreiz arstalek tamm pe damm (war-dro 37 °C gant an den).
- thermosensibilité** ◇ **thermosensitivity** ◇ **gwrezeraeziñ** Kizidigezh ouzh an argemmoù gwrez.
- thermostable** ou **thermostable** ◇ **thermostabile** ◇ **gwrezstabil** aa. A-zivout un danvezenn na gemm ket al luniad anezhi dindan wered ur c'hresk gwrezverk, evel da skouer ar gwadveizoù a harz ouzh gwrezverkoù brasoc'h eget 55 °C.
- thermostabilité** ◇ **thermostability** ◇ **gwrezstabled** b. Stad un danvezenn wrezstabil.
- thermothérapie** ◇ **thermotherapy** ◇ **gwrezkurañ** Arver yac'hadel ar wrez.
- thermotropisme** ◇ **thermotropism** ◇ **gwrezkerc'hañ**, **gwrezkerc'h** g. Ervezh durc'haat a-berzh ur struzhenn pe ul loen festet, pe etrezek ur vammenn wrez (gwrezkerc'h yaek), pe etrezek an tu kontrol (gwrezkerc'h nac'hek).
- thésaurimose** ou **thésaurose** ◇ **thesaurismosis** ◇ **tezaorismoz** g. Nep anaez diwar yoc'hadur er c'helligoù eus kementadoù usvec'hiek a zanvezennoù bonan pe gleñvedel (lipid, glikogen, fosfatid, h.a.). Ar glikogenozioù, al lipoidozioù, ar gangliozidozioù hag ar mukopolisakaridozioù zo seurtadoù tezaorismozioù. Heñvelster : *kleñved kroniadel*.
- thiamine** ◇ **thiamine** ◇ **tiamin** g. Vitamin B1, dezhañ un dasperzhiadur pouezus, evel koenzim ar c'harboksilaz, en analañ kelligel, e bevelaat ar glukidoù, e mezbur an nerveg ha marteze e kennevid al lipidoù. Bezant en amgoc'henn ar riz, en hadenn ar gwinih, en avu hag er c'hig, e tevoud an negez anezhañ beriberi an den ha liesnervennfo an evned.
- Thibierge et Weissenbach** : **syndrome de ~** ◇ **CRST syndrome**, **Thibierge-Weissenbach syndrome** ◇ **azoniad** g. **Thibierge ha Weissenbach** Kevreted ur skleroderma reizhiad ha razekadurioù endan-kroc'henn.
- Thiemann** : **maladie de ~** ◇ **Thiemann's syndrome** ◇ **kleñved g. Thiemann** Akrodisplaziezh treuzkaset er mod aotozomek enkilek, naouus dre ur varvenn anlestek eus talpennoù an eil oefisoù bizied gant ar bugel.
- thiémie** ◇ **thiemia** ◇ **gwadvec'h** g. **sulfur**, **sulfurwadvec'h** Bec'h ar sulfur er gwad.
- thiénopyridine** ◇ **thienopyridine** ◇ **tienopiridin** g. Anvad rumm daou bladanhazer, an triklopidin hag ar c'hlopidogrel. Tolc'herioù dieiltro ez int, o werediñ e par ur buzer eus an adenzin difosfat.
- Thiersch** : **greffe de ~** ◇ **Thiersch's transplantation** ◇ **imboudañ Thiersch** Imboudañ ezkroc'hennel.
- thiogenèse** ◇ **thiogenesis** ◇ **tiogenez** g. Danzeidigezh an aozadoù sulfurin.
- thiopexique** : **fonction ~** ◇ **thiopectique fonction** ◇ **arc'hwel g. sulfurinlenañ** Galloud an avu da lenañ ar sulfurinoù.
- thlipsencéphale** ◇ **thlipsencephalus** ◇ **tlipsenkefal** g. Euzheg gaouempennel dezhañ ur c'hlopenn digor, hag e-lec'h an empenn ez eus ur yoc'henn fouevanek astennet war-dreñv betek an toull bras hag a-wechoù betek mellennoù kentañ ar gouzoug, digor bras.
- Thomas** : **talon de ~** ◇ **Thomas's heel** ◇ **seul** g. **Thomas** Seul ar vomez hiraet en diabarzh evit skorañ bolz diahed an troad.
- Thomas-Lardennois** : **attelle de ~** ◇ **Thomas-Lardennois splint** ◇ **astell** b. **Thomas-Lardennois** Astell amzeriat evit torroù an ezel traoñ, emharpet war al lez hag o sachañ war an ufern diwar-bouez un anro festet ouzh penn an astell.
- Thompson** : **maladie de ~** ◇ **kleñved b. Thompson** Amwad loezadel hêrezhel henek, hep sferokitoz, gant harzder grennel reol an hemati ha dibare diwar-bouez ar felc'hezevenañ. — An hennad-se zo bet rannet da gentañ gant Selwyn ha Dacie (1954) e daou rizeh : ar rizeh I a zo reol ar gwadunanloezañ en tesaer e 37 ° ha dilerc'het ent reol dre azdodiñ glukoz ; ar rizeh II a zo muiet kenan ar gwadunanloezañ e 37 ° ennañ, hogen hep ma ve dilerc'het dre azdodiñ glukoz. — Kleñved Thompson a ranner bremañ e : amwadoù loezadel olenzimel, amwadoù gant ebarzhennoù (pe luniadoù) eneritrokite ha troazh du (a zo da lakaat moarvat e stern an hemoglobinozioù), amwad gant porfiriezh ruzparien hag amwad dre zaskemm koc'henn an hemati.
- Thomsen** : **maladie de ~** ◇ **Thomsen's disease** ◇ **kleñved g. Thomsen** Anez hêrezhel treuzkaset er mod trec'hek, naouus dre usteñv ar c'higennoù hag ur viontiezh hollek. Diazezet eo ar c'hleñved war un ezreolder eus iongan ar c'hlor (sl. *canal ionique*).
- thoracectomie** ◇ **thoracotomy** ◇ **bruskezvenañ** Dazbidañ un darn vras pe vrasoc'h eus speur ar brusk.
- thoracentèse** ou **thoracocentèse** ◇ **thoracentesis** ◇ **bruskezwanañ** Ezwanañ speur ar brusk evit erc'hwiliañ pe digarzhañ kavenn ar c'hrezoù.
- thoracique** ◇ **thoracic** ◇ **~brusk**, **brusk-**, **~ar brusk**, **~brusk**, **bruskel** aa. A-zave d'ar brusk.
- thoraco-laparotomie** ◇ **thoracolaparotomy** ◇ **brusk-torebenañ** Enbenañ speur ar brusk ha hini ar c'hof.
- thoracopage** ◇ **thoracopagus** ◇ **torakopag** g. Euzheg daouat a zo an daou berzhiad anezhañ unanet e par ar brusk.
- thoraco-phréno-laparotomie** ◇ **thoracolaparotomy** ◇ **brusk-megin-torebenañ** Enbenañ speurioù ar brusk, ar vegin hag ar c'hof.
- thoracoplastie** ◇ **thoracoplasty** ◇ **bruskatleviñ** Dazbidañ darnel pe hollek eus lies kostenn amkanet da zevoudañ flakadur ar skevent dre angrizadur speur ar brusk.
- thoraco-pleuro-pneumonectomie** ◇ **thoraco-pleuro-pneumonectomy** ◇ **brusk-krezenn-skeventezvenañ** Krezennskeventezvenañ klokaet gant ur bruskatleviñ.

thoracotomie ◇ **thoracotomy** ◇ **bruskenbenañ** Enbenañ speur ar brusk, alies gant dilemel ur gostenn, amkanet pe da er-c'hwiliñ pe kentañ lankad da oberata ar skevent, ar galon pe an treizher.

thoraco-xiphopage ◇ **torakoksifopag** g. Euzheg krouellel daouat a zo an daou berzhiad anezhañ unanet e par ar c'hlerennou, migorn ar c'hostoù hag an avuioù, gant dehouwariadur ar galon gant unan eus ar gouzrec'hioù ha kehent an div amgalonenn.

thoradelphie ◇ **thoracodelphus** ◇ **toradelf** g. Euzheg daouat unempennel, naouus dre vezañs daou gef disrannet splann dindan ar begel (pevar ezel traoñ) hag en arun a-us (daou ezel krec'h, ur penn hepken).

thorax ◇ **thorax** ◇ **brusk** g. Rann grec'h ar c'hef, keneret ouzh ar gouzoug hag an izili krec'h, dispartiet diouzh ar c'hof gant ar gelc'hspereenn. Atel ar speur anezhañ zo amparet gant mellennoù ar brusk, ar glerenn hag ar c'hostoù; er gavenn anezhañ emañ ar skevent hag ar poullkreiz.

thorax en bréchet ou **en carène** ◇ **chicken breast** ◇ **brusk evnek** Kammneuziad ar brusk, naouus dre arblated kostezel ar c'hostoù ha rakvaliradur ar glerenn.

thorax en entonnoir ◇ **funnel breast** ◇ **brusk trezeriek** Kammneuziad ganedigel pe arzeuat (lec'h), anezhi ur pukadur eus rann izelañ ar glerenn, en ervez da vezañ en orin ur skorted analadel.

thorax en sablier ◇ **rachitic chest** ◇ **brusk poultreiek** Kammneuziad diwar al lec'h, naouus dre strishadur ar brusk dindan an divgazel hag en arfrank el lodenn draoñ, m'emañ o keneren ouzh ur c'hof ec'honek.


thorax en tonneau ◇ **barrel chest** ◇ **brusk tonellek** Neuz dibarek ar brusk, reut, diloc'hek en enanalañ helc'het, arsellet gant emfizemateion 'zo, razekaet migern o c'hostoù.

Thoren : test de ~ ◇ **proud** g. **Thoren** Proud da zinoñ un negez magnezium. Un trefennad engwazhiennel kloridenn vagnezium a zisoc'h gant ezvevnañ hogos 90 % eus ar magnezium en troazh gant ar gouzrec'h bonan, tra ma talc'h ar gouzrec'h negezet 40 % da nebeutañ.

Thorn : test de ~ ◇ **Thorn's test** ◇ **proud** g. **Thorn** Imbourc'h ar gaenuslounehenn diwar-bouez an ACTH. Gant ar gouzrec'h bonan e tevoud diounezadur ACTH ul leiadur eus an eozinofil hag ur muiadur eus ar c'hortizol er plasma. Ouzh an ACTH e vez erlec'hiet bremañ ar sinakten, kaenwezher kevanaoz anvet ivez tetrakozaktid.

Thorotrast® : maladie du ~ ou **thorotrastose** ◇ **Thorotrast® disease**, **thorotrastosis** ◇ **kleñved g. an Thorotrast®**, **torotrastoz** g. Kleñved devoudet gant arver an Thorotrast® (dioksidenn doriom), evel aozad dargemm e skinouriezh ar gwazhi-ed, betek ar bloavezhioù 50 hag a gevaraeze, en amzer-se, kaout disoc'hoù dreist. Hogen hir kenan e oa an ezvevnedigezh anezhañ ha devoudañ a rae ur skinata (α , β ha γ) hirbad eus ar bevedeg, kiriek e lies degouezh da zarvoudoù diwezhat (eus 15 da 20 vloaz war-lerc'h ensinkladur an aozad), evel kirroz pe kankr an avu, pe a-wechoù tizhad mel an eskern. Bremañ ez eo aet da get an torotrastoz, o chom, avat, evel ul skouer tragek eus an dienlenadoù argevezus a c'hell c'hoarvezout da heul diounezadur un aozad nevez...

thréonine ◇ **threonine** ◇ **treonin** g. Amindrenkenn digorvellek, bezant en darn vrasañ eus ar proteinoù, unan eus an 9 amindrenkenn vevret evit mab-den. A-fet luniad ez eo heñvel ouzh ar valin, gant ur stroll hidrosil war ar garbon β , avat. Dre se e kaver er volekulenn anezhañ div garbon digemparzh, hag emañ an treonin e rezh pevar stereiozomer. An diastereiozomer treo (2S, 3R) zo an hini paotañ ent naturel, an diastereiozomer allo (2S,3S) o vezañ dibaotoc'h a-galz er reizhiadoù bevedel. Un amindrenkenn vevret evit bevedeg an den eo an L-treonin.



thrombasthénie ◇ **thrombasthenia** ◇ **trombasteniezh** b. Daskemm neuz ha perzhioù pladanoù ar gwad, reol o niver, muiat zoken. An disoc'h zo strafuilhoù er gwadkaeañ.

thrombasthénie héréditaire ◇ **hereditary thrombasthenia** ◇ **trombasteniezh hêrezhel** Anvet ivez *tromboasteniezh Glanzmann*, azoniad gouliñvel hêrezhel dibaot, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, leteñvel ouzh ar purpura olpladanel hennadek, diforc'h dioutañ avat dre berzhioù ar pladanoù a zo dezho, hag int reol o niver, ul liesseurtet a neuzioù hag a lenidigezhioù ouzh al livuzennoù; ouzhpenn se n'int ket tuet da dazañ e nep doare. Arstalek eo ankurzhusted ar gaouledenn, uspad an diwadañ, arouez ar rolt. Devoudet eo ar c'hleñved-se gant ezvezañs (rizh I) pe gant divig (rizh II) eus ar gemplezh c'hlikoproteek IIb-IIIa.

thrombectomie ◇ **thrombectomy** ◇ **trombuzezvenañ** Dilemel un trombuz diouzh oaled ur wazhiedenn, goude bezañ skejet ar speur anezhi, pe diwar-bouez ur suc'hañ dre an hent treuzkroc'henek.

thrombine ◇ **thrombin** ◇ **trombin** g. Enzim o tisoc'h diouzh blivadur ar protrombin er plasma hag a dreuzfurm ar fibrinogen e fibrin. Amparet eo e-doug kaouledadur ar gwad dre dreuzfurmadur ar protrombin dre an tromboplastin (er gwad pe er gwiadoù), ar

c'halkioma ha parennoù kaouledañ all moarvat (akelerin ha prokonvertin). — **amzer an trombin** : pad ar c'haouledañ muzuliet war ur plasma dirazekaet, ha goude adrazekaet e bezañ ur reñver trombin ; an disoc'h zo pad ar fibrinfurmiñ a zo e dalc'h kementadoù ar fibrinogen, an antitrombin hag an heparin endalc'het er plasma. Ent reol e vez er gavael etre 2 ha 4 eilenn (sl. **antithrombine** ha **antithrombotique**).

thrombinoformation ◇ **thrombin formation** ◇ **thrombinfurmiñ** Treuzfurmadur ar protrombin e trombin dindan wered an tromboplastin, eil lankad ar c'haouledañ a bad ent reol 12 eilenn (sl. **thromboplastine** ha **fibrinoformation**).

thrombinomimétique ◇ **thrombin-like** ◇ **trombingeveler aa. & g., trombinvanek aa.** Danvezenn o tec'han gweredoù heñvel ouzh re an trombin. Ar stafilokoagulaz zo un enzim trombinvanek, un trombingeveler ha trombinvanek eo ivez binim naered 'zo.

thrombo-agglutination ◇ **thrombo-agglutination** ◇ **pladandazgludañ** Dazgludadur pladanou ar gwad (sl. **agrégation des plaquettes**).

thrombo-agglutinine ◇ **thrombo-agglutinin** ◇ **tromboaglutinin g.** Antikorf bezant e gwadveizoù ezreol 'zo, en araez da zazgludañ pladanou ar gwad.

thrombo-angéite oblitérante ◇ **thrombo-angeitis obliterans** ◇ **tromboangeit g. anforzhus** Azoniad arsellet hogos hepken gant gourevd yaouank, a orin semitek, eus Kreizeuropa, o revutuniñ. Naouus eo dre un hollwazhiedfo lemm anforzhus strewek, o wazhañ da gentañ talmerennoù pellek an divesker, o tedreñ dre resmiadoù gant laurioù, tizhadoù ar gwazhiennou ha gouliezoù. An adfeilhoù kenheuilh a zedro da vuturmiadurioù ha d'ar marv en un nebut mizvezhioù pe vloavezhioù. Evit aozerion 'zo e c'hoari an uc'harc'hwel uslouezhel ur roll gourfouezus e dinodadur ar c'hleñved-se. Dindan gevarguz emañ hiniended an kez azoniad.

thrombo-anticorps ◇ **antiplatelet antibody** ◇ **antikorf g. pladanhazer** Antikorf en araez da zispenn (trombo- pe trombo-kitolizin) pe da zazgludañ (trombo- pe trombokitoaglutinin) pladanou ar gwad.

thrombo-artérite ◇ **thromboarteritis** ◇ **talmerenno g. anforzhus** Tanijenn un dalmerenn, ma en em furm ur gaouledenn. **t. a. ar re yaouank** : sl. **thrombo-angéite oblitérante**, anvet ivez **kleñved Léo Buerger**. — **t. a. kroniadel** : anvet ivez **tromboarterioz**, talmerenno anforzhus dic'henezhadel a orin ateromatus.

thrombo-aspiration ◇ **thrombo-aspiration** ◇ **trombuzuc'hañ** Seurtad trombuzevenañ, disteviañ ur wazhiedenn dre suc'hañ.

thrombocytémie ◇ **thrombocythaemia** ◇ **gwadtrombokitegezh b.** Muiadur trebadek niver ar pladanou er gwad (uheloc'h eget 800 000 / mm³). Kevredet e vez alies ouzh ul leukemiezh, un elruz, ur c'hleñved Hodgkin, h.a.

thrombocytémie essentielle ◇ **idiopathic thrombocythaemia** ◇ **gwadtrombokitegezh hennadek** Azoniad melneradel dianav e arbenn, naouus dre usniver an trombokit, usniver ar megakariokit e mel an eskern, ur felc'husvent, fronwadoù ha gwadliñvoù er c'hreiz hag en daouezenn. Gorrek e vez an dedro ha feudek bepred.

thrombocytolyse ◇ **thrombocytolysis** ◇ **pladanloezañ** Dispenn ar pladanou.

thrombocytopenie-aplasie radiale : syndrome de ~ ◇ **thrombocytopenia-radial aplasia syndrome** ◇ **azoniad g. olpladanou-angwe ar werzhid** Kammneuziad hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek o kevredañ : un ezreolder eus an divarvrec'h hag an daouarn (ezvezañs ar werzhid, disneuziad an helmo, krakezelegezh) hag a-wechoù eus eskern all ; un tuadur gwadliñvel : parañ a ra mel an eskern nebut a bladanoù pe hini ebet, met kalz a leukokit greunek ; erziwezh, ezreolderioù eus ar galon, al lounezhi, an treizher.

thrombocytopenië ◇ **thrombocytopenia** ◇ **trombokitparañ** Furmiñ an trombokit.

thrombocytose ◇ **thrombocytosis** ◇ **elbladanou g.** (sl. **hyperplaquetose, thrombocytose**).

thrombo-élastogramme ◇ **thrombo-elastogram** ◇ **tromboelastogramm g.** Krommenn lerc'hwezet dre luc'hskeudenniñ gant an tromboelastograf.

thrombo-élastographie ◇ **thrombo-elastography** ◇ **tromboelastografiñ** Araezad studi vloc'hel ar gwadkaeañ diazezet war vuzul dastennegezh ar gwad war gaouledañ, ha goude, hini ar gaouledenn, diwar-bouez an tromboelastograf. Kalvezder dispredet.

thrombo-embolique : **maladie ~** ◇ **thromboembolic disease** ◇ **kleñved g. trombozenfraouek** Argerzh kleñvedel naouus dre furmadur er gwazhiennou eus kaouledennoù gwad en arvar d'en em zistagañ ha da grouiñ enfreier skevent. Digemmet e vez daou rizh : ar **flebotromboz** hag an **tromboflebit**. — Degouezhioù 'zo eus ar c'hleñved trombozenfraouek adfeilhus kentael, gougevret ouzh ar rizh kentañ, o tarvezout gant gouzrec'hed yaouank, zo kleñvedoù molekulel, diwar un divig trombindolc'her III pe protein C, diwar ezreolderioù ar fibrinogen pe reizhiad ar fibrinloezañ.

thrombogène ◇ **thrombogenic** ◇ **tromboseiat aa.** O tevoudañ un tromboz.

thrombogènese ◇ **thrombogenesis** ◇ **trombozardarzh g.** Dinodadur an tromboz.

thrombolysse ◇ **thrombolysis** ◇ **kaouledloezañ** Loezadur ur gaouledenn.

thrombolysine ◇ **1 fibrinolizin g. 2 trombolizin g.** 1 (sl. **fibrinolysine, plasmine, thrombolysine, tryptase**) 2 antikorfou endalc'het e gwadveizoù ezreol 'zo, en araez da zispenn pladanou ar gwad (sl. **thrombo-anticorps**).

thrombolytique ◇ **thrombolytic** ◇ **kaouledloezus aa., kaouledloezer aa. & g.** En araez da loezañ ar c'haouled gwad (sl. **fibrinolytique**).

thrombomoduline ◇ **thrombomodulin** ◇ **trombomodulin** g. Protein koc'hennel enien (parzh kevanek a 'r goc'henn) bezant war c'horre ar c'helligoù endotelel, kedparenn an trombin, dezhañ ur gwered enepkaouediñ.

thrombopathie ◇ **thrombopathia** ◇ **pladananaez** g. Nep anaez diwar un disleberadur eus perzhed pladanoù ar gwad. — *pladananaez genezhel* : sl. *plaquettes grises : syndrome des ~*.

thrombopathie pseudo-Willebrand II B ◇ **pseudo-Von Willebrand disease** ◇ **pladananaez gaou-Willebrand II B** Pladananaez genezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, oc'h erzerz'hañ dre wadliñvoù, un hiraat a 'n amzer wadañ, un olpladanoù ; ar pladanoù, kresket o ment, zo tuet da zazgludañ war lavnenn. Bec'h ar barenn von Willebrand er plasma a zigresk dre berzh un degerc'had muiaet e par koc'henn ar pladanoù, devoudet e unan gant ur reñver glikoprotein.

thrombopénie ◇ **thrombopenia** ◇ **olpladanoù g.**, **pladanisvec'h g.** Isniver ar pladanoù er gwad amredat dindan 150 000/mm³, o tec'han gwadliñvoù, dreist holl pa ziskenn ar bec'h dindan 50 000/mm³. Bez' e c'hell bezañ genezhel pe arzeuat diwar ur skorted kementadel pe zoareadel eus ar baridigezh anezho, diwar ar rezispenn pe an dasparzh ezreol anezho.

thrombophlébite ◇ **thrombophlebitis** ◇ **tromboflebit** g. Tanienn ur wazhienn kevredet gant un tromboz.

thromboplastine ◇ **thromboplastin** ◇ **tromboplastin** g. Teskad an danvezenoù o vliavaat kaouledadur ar gwad dre dreuzfurmiñ ar protrombin e trombin. Digemmañ a reer protrombin ar plasma (pe endeuat) diouzh protrombin ar gwiadoù (pe ezdeuat).

thromboplastinoformation ◇ **thromboplastinoformation** ◇ **tromboplastinurmiñ** Danzen an tromboplastin endeuat, engwazhiedel, e-kerz kaouledadur ar gwad ez eo al lankad kentañ anezhañ. — *prouad tromboplastinurmiñ Bigg ha Douglas* (Sz. Bigg and Douglas thromboplastinoformation test, Gl. test de thromboplastinoformation de Bigg et Douglas) : hentenn imbours' hva o kevaraezañ studiañ danzeidigezh an tromboplastin diwar ar parennoù diseurt, da resizañ dasperzhiadur ar pladanoù ha da savelañ rizh un hemofiliezh.

thromboplastinogénase ◇ **thromboplastinogenase** ◇ **tromboplastinogenaz** g. Enzim lipoidek dilaosket dre zispennadur an trombokit hag a dreuzfurm an tromboplastinogen e tromboplastin. Emañ ivez an tromboplastinogenaz en holl wiadoù eus ar bevedeg (sl. *parennoù (pro)tromboplastek*). — Digemmañ a reer lies parenn bladanel, en o zouez ar *barenn bladanel 2* protidek hag ar *barenn bladanel 3* fosfolipidek, an div o kevaraezañ furmiñ ar fibrin ; ar *barenn bladanel 4*, en araez da neptuiñ an heparin ha danvezenoù all, evel an ec'haozadoù diwar ar fibrinogen hag ar fibrin, dezho ur perzh eneptromboz.

thromboplastinogène ◇ **thromboplastinogen** ◇ **tromboplastinogen** g. Parenn gaoulediñ VIII, blivaer an tromboplastin plasmatek, an diouer anezhañ o vezañ naoous d'an hemofiliezh A. Ouzhpenn se ez eo kevredet strizh gant parenn von Willebrand, pe VWF pe c'hoazh parenn VIIIIR : RCo (kedparenn ar listoketin). — An hollad a ampar ar barenn VIII/parenn Willebrand (F. VIII/VWF), glikoprotein a dolz mol molekul uhel a ra diouer e kleñved von Willebrand (sl. *hémophilie, Willebrand : facteur de von ~, Willebrand : maladie de von ~*).

thromboplastique ◇ **thromboplastic** ◇ **tromboplastek** aa. A-zivout an danvezenoù o kevaraezañ treuzfurmiñ ar protrombin e trombin, eleze kaoulediñ ar gwad.

thrombopoiétine ◇ **thrombopoiétin** ◇ **trombopoiétin** g. Danvezenn a orin avuel o fraouaat paridigezh ar pladanoù (trombokit).

thrombose ◇ **thrombosis** ◇ **tromboz** g. Furmadur un trombuz e diabarzh ur wazhiedenn pe ur gavenn a 'r galon.

thrombospondine ◇ **thrombospondin** ◇ **trombospondin** g. Glikoprotein borc'het dreist holl gant greunanoù α ar pladanoù dindan wered an trombin, o tasperzhiañ e dazadur ar pladanoù.

thrombostatique ◇ **thrombostatic** ◇ **1 trombozharzus** aa. **2 trombozharzer** aa. & **g. -ioù** 1 a-zivout nep danvezenn o herzel ouzh dinodadur un tromboz, eleze furmadur un trombuz en ur wazhiedenn pe ur gavenn a 'r galon. Termenoù damheñvelter eo *enepkaouledus, enepkaouleder* 2 un danvezenn, un aozad trombozharzus.

thrombosthénine ◇ **thrombosthenin** ◇ **trombostenin** g. Protein bezant e pladanoù ar gwad, dezho un dasperzh pouezus e kurzhañ ar gaouledenn.

thrombotest ◇ **Owren's thrombotest** ◇ **prouad g. Owren, proud ar parennoù kaouediñ** Hentenn amkanet da andalañ, e plasma ar gwad, bec'h ar 4 farenn gaoulediñ (protrombin, prokonvertin, parenn antihemofilek B ha parenn Stuart), a zo dindan wered ar vitaminKdolc'herioù. Muzuliañ a reer buanez kaouediñ e 37 °C ar plasma bet kiritrat ha mesket gant keduzenn Owren, o c'hoarvezout peurgetket eus kefalinn, tromboplastin goarwered ha kloridenn galkiom. Ent reol e pad ar c'haouledadur 35 eilenn. Ar proud-se, aes da embreger, a vez ergemennet evit eveshaat gweredoù enepkaouediñ ar vitaminKdolc'herioù. Bastus e ve an kez gweredoù pa vez disoc'hoù proud Owren er gavael 10 da 25 % eus ar werzhad reol. Hogen, evel muzuliañ amzer Quick, ne imbours'her gant proud ar parennoù kaouediñ nemet ur gennad eus ar c'haouediñ ha ne ditour ket ar gaouledust hollek.

thromboxane ou **thromboxane A₂** (TXA ou TBXA₂) ◇ **thromboxane** ◇ **tromboksan** g. Danvezenn a zever eus an drenkenn arakidonek enaozet gant al leukokit hag ar pladanoù, nes d'ar prostaglandinoù. Devoudañ a ra gwazhiedstrishaat ha pladandazañ e degouezh a anaf eus an endotelienn. An tromboksan A₂ (TBXA₂) a em dreuzfurm buan e tromboksan B₂ (TBXB₂), stabiloc'h hogen diwered (sl. *prostaglandine, prostacycline*).

thrombus ◇ **thrombus** ◇ **tromboz** g. Kaouledenn wad furmet er galon pe en ur wazhiedenn, ma tec'han un tromboz. — *tromboz gwenn* pe *tromboz kengludañ* (Gl. *thrombus blanc* pe *thrombus de conglutination* Sz. *white thrombus, white clot*) : tromboz amparet gant pladanoù dazgludet gant leukokit kempeget outo. N'eo ket ur gaouledenn wad, pa n'eus ennañ na fibrin na hemati. — *tromboz speurel* (Gl. *thrombus mural* Sz. *mural thrombus*) : tromboz furmet e par un anaf eus an enkalonenn. — *tromboz ruz*

pe *trombus emledañ* (Gl. *thrombus rouge* ou *thrombus de propagation* Sz. *red clot*) : kaouledenn amparet gant kelligoù ruz ha gant un nebeut kalzadoù pladanoù engronnet en ur rouedad fibrin, a emfurm, e degouezh a dromboz engwazhiedel, war an trombus gwenn, oc'h emledañ e tu red ar gwad ouzh speur ar wazhiedenn, gletet mui pe vui outi (sl. *coagulation*, *fibrine* ha *hémostase*).


THS ◇ **HRT, Hormon Replacement Therapy** ◇ **PHA, prederiadur g. hormonel amsaviñ** Prederiadur hormonel amsaviñ ar paouez mizioù.

Thygeson ◇ **kératite de ~** ◇ **Thygeson's keratitis** ◇ **kornsaeo g. Thygeson** Kornsaeo daoudo dluzhet, naouus dre vezañs strolloù greun bihan arwenn e gwiskadoù gorre ar gornsae. Kregiñ a ra trumm dre un daeraouiñ hag ul luc'hgaz. Dedreiñ a ra etrezek ar pare, daoust d'an adfeilioù a c'hell askouezhañ e-pad daou vloavezh.

thymectomie ◇ **thymectomy** ◇ **toazonezvenañ** Dilemel surjanel an toazon.

thymie ◇ **thymia** ◇ **noa g.** Imor, eniñv kantaazel ha fromel.

thymine ◇ **thymin** ◇ **timin g.** Bazenn birimidek kedrann an trenkennoù dezoksiribonukleek (DNA). An trenkennoù ribonukleek (RNA) a endalc'h peurliesañ urakil e-lec'h timin.



thymique ◇ **thymic** ◇ **1 ~toazon, ~an toazon, toazonel aa. 2 noaek aa.; -noaek 3 ~noa, ~an noa; noael aa., -noael** 1 A-zave d'an toazon 2 Arveret evel lostger : *disnoaek* 3 A-zave d'an noa, arveret ivez evel lostger : *disnoael, isnoael, kelc'hnoael*.

thymiques : hormones ~ ◇ **thymic hormones** ◇ **hormonoù l. (g.) toazonel** Polipeptid borc'het gant an toazon, bezant er gwadveiz hag o kendaoliñ da hangaec'hougou al limfokit toazonamlegat (limfokit T), gwezherioù an hangae kelligel. Lies hormon toazonel zo bet deskrevet : an *timozin*, an *timin*, ar *barenn dourennel toazonel*, ar *barenn toazonel gwadveizel* (anvet nevez 'zo *timulin*) (sl. *cellules thymodépendantes*).

thymo-analeptique ◇ **antidepressant** ◇ **1 noausreüs aa., noausreer aa. 2 noausreer g. -ioù** 1 O kentraouiñ an noa. || 2 Lia noausreer. Bredusreerioù ez eus eus an noausreerioù (sl. *antidépresseur*).

thymocytes ◇ **thymocytes** ◇ **timokit s.** Kelligoù an toazon, arveret ivez a-wechoù evel heñvelster da "kelligoù toazonamlegat".

thymocytome ◇ **thymocytoma** ◇ **timokitom g.** Yoc'henn guñv an toazon, amparet gant timokit peurgetket.

thymodépendant ◇ **thymus-dependent** ◇ **toazonamlegat aa.** E dalc'h an toazon, evel al *limfokit T* ent dibarek.

thymoépithéliome ◇ **thymoepitheliome** ◇ **timoepiteliom g.** Yoc'henn guñv an toazon, dinodet kent pep tra diwar goust an anneauenn epiteled ha korfoù Hassal.

thymol : réaction au ~ de MacLagan ou **thymol-test** ◇ **thymol turbidity test, MacLagan's test** ◇ **dazgwered g. an timol MacLagan, proudad (an timol) MacLagan** Malzenniñ ar gwadveiz pa azdoder un dileizhenn dimol. Kreñvder an dazgwered a gresk evit ikterioù dre avufo, tra ma vez reol e degouezh an ikterioù dre azdalc'h; emañ a-zalc'h gant bec'h ar β-lipoproteinoù ha hini an immunoglobulinoù M er gwadveiz. Gwerzhadoù reol : izeloc'h eget 1 derez MacLagan, izeloc'h eget 10 derez Vernes, izeloc'h eget 40 derez Meunier. Dilezet eo bet an dazgwered-se.

thymoleptique ◇ **thymoleptic** ◇ **1 noaisreüs aa., noaisreer aa. 2 noaisreer g. -ioù** 1 O c'houzizañ an noa. || 2 Lia noaisreer. Bredusreerioù ez eus eus an noaisreerioù.

thymolipome ◇ **thymolipoma** ◇ **timolipom g.** Lipom toazonel.

thymome ◇ **thymoma** ◇ **timom g.** Anvad rumm yoc'hennoù an toazon, yud pe guñv.

thymoprive ◇ **thymoprivous** ◇ **oltoazonel g.** A-zave da ezvezañs an toazon.

thymorégulateur ◇ **noaaroustaler aa. & g. -ioù** 1 O tereizhañ strafuilhoù an noa. || 2 Lia noaaroustaler, al litom da skouer (sl. *cyclothymie* ha *psychothope*).

thymus ◇ **thymus** ◇ **toazon g.** Organ limfoidel drek-klerenn, a zigresk an ec'honad anezhañ goude eil bloavezh ar vuhez.

thyrogène ◇ **thyrogenous** ◇ **1 skoedennien aa. 2 skoedennwezhus aa., skoedwezher aa. & g. -ioù** 1 A orin skoedennel. 2 O wezhiañ war ar skoedenn & lia skoedwezher.

thyroopathie ◇ **thyroopathy** ◇ **skoedanaez g., skoedennad g.** Anvad genadel anaезioù ar skoedenn.

thyrooprive ◇ **thyroprivic** ◇ **olskoedien aa.** Dianlenat da ezvenañ ar skoedenn.

thyrooptose ◇ **thyroptosis** ◇ **skoedennislink g.** Dilec'hiadur war-draoñ ar skoedenn e parzh krec'h kavenn ar brusk.

thyroostimuline (TSH) ◇ thyroid stimulating hormone ◇ tireostimulin g., TSH Hormon borc'het gant ar rakgougorfenn, dezhañ da wered kontraouiñ borc'herezh hormonoù ar c'hougorfenn. Arouleviet eo ar feur anezhañ gant bec'hioù an hormonoù skoedel T3 ha T4 er plasma. — **prouad an tireostimulin** (Gl. *test à la thyroostimuline*, Sz. *TSH test*) : keñveriañ delenadur an iod skinoberiek gant ar skoedenn a-raok ha goude ensinklatur TSH. Uhelaat a ra an delenadur e degouezh a skorted skoedennel gougorfennien. Gant ar gouzrec'h bonan, ar prouad a gresk delenadur an iod skinoberiek eus 60 da 80 % er 24vet eur.

thyroostimuline : syndrome de sécrétion inappropriée de ~ ◇ inappropriate secretion of thyrotropin syndrome ◇ azoniad g. ar borc'hañ diazas tireostimulin Seurtad dibaot a skoedusvorc'hegezh, kevredet gant ur feur uhel ent ezreol eus an hormon skoedwezher (TSH). Ar arbenn anezhi a vez ar peurliesañ un adenom gougorfennel (ur bec'h uhel eus isunvez α rez an TSH er gwad a stader, an isunvez β o vezañ andezventadus). Dibaotoc'h c'hoazh eo an harzderioù trobarzhat ouzh an hormonoù skoedel.

thyrotoxicose ◇ thyrotoxicosis ◇ tireotoksikoz g. Stad kleñvedel diwar ur borc'hañ endeuat pe un diounit reñverek a hormonoù skoedel : an tiroksin (T4) hag an triiodotironin (T3). Ar c'hleñved-se zo ur furm a skoedusvorc'hegezh vuiek dibaot a-walc'h diwar ur miarc'hwel eus ar wagrenn skoed. Ar arbenn pennañ a vez kleñved Basedow, e 70-80 % eus an degouezhioù. Tizhet e vez ar beneved yaouank pergen gant ar c'hleñved unanhangaeel-se. Menegomp ivez, a-douez an arbennoù all : adenom pistriek ar skoedenn, ar pennsac'h pe nozeleenn bistriel (usvorc'h hormonoù skoedel) ha, dibaotoc'h, ur skoedennfo goulemm. Kemm zo etre an azonou hag etre ar c'hreñvder anezho a-geñver gant an hiniennou hag orin ar c'hleñved. Erzerc'hañ a reont dreist holl dre dizhad an nervreizhiad (rastrid, kalonustead, usc'hwez, kren an daouarn, strafuilhoù an noa, nervernegezh, enkre, anhun). Er par korfel ez erzerc'h ivez an tirotoksikoz dre vouilhadoù tomm, ur santad a itik o padout, koll tolz kaherel. Hag eñ kentoc'h kuñv gant ur gouzrec'h yaouank bonan, emañ an kez naoued en ervez da gaout dianlenadoù grevusoc'h gant tud tizhadusoc'h : merc'hed dougerez, nevezc'hanidi, kalongleñvion, isvagidi. O vezañ ma 'z eo ar skoedenn ur wagrenn o tasperzhiañ er c'hreskiñ hag er c'hennnevid, emañ en ervez an tirotoksikoz da wazhañ diorreadur un oadour yaouank. — **tirotoksikoz kentael** (Gl. *t. primitive* Sz. *primary t.* : o tinodiñ adalek tizhad ar skoedenn. — **tirotoksikoz eilvedel** (Gl. *t. secondaire* Sz. *secondary t.* : o tinodiñ diwezhat pe ziwezhatoc'h e-doug dedro ur pennsac'h (sl. *goître basedowifié ou basedowifiant*).

thyroéotrope ◇ thyreotropic ◇ skoedwezher aa. Gant ur gerc'husted d'ar wagrenn skoed pe o werediñ warni.

thyroéotrope : hormone ~ ◇ thyrotropic hormon, TSH ◇ hormon skoedwezher (sl. *thyroostimuline (TSH)*).

thyrocalcitonine : syndrome d'hyposécrétion de ~ ◇ azoniad g. skoedisvorc'h an tirokalkitonin Azoniad dibaot devoudet gant skoedisvorc'hañ ar c'halkitonin. Arsellet e vez gant gouzrec'hed 'zo tizhet gant ur pennsac'h eeun, gant ur skoedus- ha dreist holl ur skoedisvorc'hegezh. Naouus eo dre ur c'halkiomwadusvec'h skañv pe a-wechoù dre un hiradur eeun eus krommenn prouad ar c'halkiomvec'hiañ (sl. *hypercalcémie provoquée : épreuve d'~*).

thyrocytes ◇ thyrocytes ◇ tirokit s. Kelligoù ar skoedenn.


thyroglobuline ◇ thyroglobulin ◇ tiroglobulin g. Glikoprotein iodet uhel kenan an tolz mol anezhañ (650 000 d), bezant e bolc'henoù kolloidel ar skoedenn ha borc'het gant kelligoù diaz ar bolc'henoù-se. Enno emañ 95 % eus an iod skoedennel : en tiroglobulin eo e len an iod ouzh an tirozin hag en em ampar an hormonoù skoedel. An tiroglobulin zo ur merker eus kankroù diforc'hek ar skoedenn. Ar bec'h anezhañ a vez ent reol izeloc'h eget 60 ng/mL (sl. *marqueurs tumoraux*).

thyroïde ◇ thyroid ◇ 1 skoed aa. 2 gwagrenn b. skoed, skoedenn b. 1 *Migorn skoed* (Gl. *cartilage thyroïde*) : an hini ec'honekañ eus migern ar c'harloc'henn o valirañ a-us d'ar migorn lagadenn. — *gwagrenn skoed* (Gl. *corps ou glande thyroïde*) pe 2 *skoedenn* : gwagrenn enborc'hat lec'hiet dirak ar ganol c'harloc'henn-briant, er parzh traoñ-araok ar gouzoug. C'hoarvezout a ra eus div dolbezenn gostezel viheñvel, keneret gant ur strizh, ma emzistag a-wechoù un dolbezenn etreat, an dolbezenn bikernennek. Amparet eo ar wagrenn skoed gant bolc'henoù, enno un danvezenn golloidel, e-barzh ur gwiaid kenengel, ha gronnet gant ur rouedad wazhied. Borc'hañ a ra an hormonoù skoedel : T3 (triiodotironin) ha T4 (tetraiodotironin pe tiroksin).

thyroïdectomie ◇ thyroïdectomy ◇ skoedennezvenañ Dilemel surjaniel, darnel pe hollel, ar wagrenn skoed.

thyroïdien ◇ thyroid ◇ 1 ~skoedenn, skoedennel aa., skoedel aa. 2 skoedeneg g. -eion 1 A-zivout ar wagrenn skoed. 2 Den tizhet gant ur skoedanaez.

thyroïdiennes : hormones ~ ◇ thyroid hormones ◇ hormonoù l. (g.) skoedel Hormonoù borc'het gant ar skoedenn, amindrenkennoù iodet anezho. Enaozet int e-barzh an tiroglobulin (o c'hadav hag o dilaosk) dre degouesadur an iodotirozinoù (monoiodo- ha diodo-tirozin). An kez hormonoù zo : an triiodo-3,5,3'tironin (T3) hag an tetraiodo-3,5,3',5'tironin (anvet ivez *tiroksin*, T4), nebutoc'h pouezus. Muiaat a reont ar bevezadur oksigen er gwiaoù, ar c'hennnevid diazez hag ar gwrezeparañ, buanaat ar c'hreskiñ ha korvez ar galon. Ar skoedenn a vorc'h ivez ar c'halkitonin (sl. *calcitonine* hag *iodémie*).



thyroïdisme ◇ **thyroidism** ◇ **skoedennegezh** b. Teskad ar strafuilhoù diwar ziounit douhennadoù skoedennel a zoenadoù reñverek.

thyroïdite ◇ **thyroiditis** ◇ **skoedennfo** g. Anv genadel tanijennoù ar wagrenn skoed.

thyroïdothérapie ◇ **thyroidotherapy** ◇ **skoedkurañ** Arver yac'hadel an douhennadoù skoedennel pe an hormonou skoedel.

thyropathie ◇ **thyropathy** ◇ **skoedanaez** g., **skoedennad** g. (sl. *thyréopathie*).

thyrotomie ◇ **thyrotomy** ◇ **skoedenbenañ** Skejañ ar migorn skoed war-benn gwezhañ war ar c'harloc'henn.

thyroxin binding globulin (TBG) ◇ **thyroxin binding globulin (TBG)** ◇ **globulin** g. **tiroksinlenus (GTL)** Ar globulin tiroksinlenus zo unan eus an tri rumm proteinoù dezouger hormonou skoedel er gwad, an daou all o vezañ an transtiretin (TTR, anavezet ivez dindan an anv TBPA) hag an albuminoù gwadveizel. A-douez an tri ez eo an TBG a zo dezhañ al lenusted uhelañ evit an tiroksin (T4) hag an triiodotironin (T3), hogen, a-gevenep d'an daou rumm all a broteinoù, n'eus nemet un hanload o lenañ an T4 pe an T3 evit pep molekul. Ha bez' ez eo ivez an TBG ar rumm gant ar bihanañ gwadvec'h. Nag evit se, e treuzdoug an TBG 70 % eus an T4 ha 65 % eus an T3 er gwad. Gwadvec'h an T4 hag an T3 zo ken izel, ma 'z eo gannet dibaot a wech an TBG betek ouzhpenn 25 % gant ur molekul hormon skoedel. An hormonou skoedel lenet ne entoont ket er c'helligoù ha neuze e vezont sellet evel anniñvek ent bevedel. Arc'hwelañ a reont evel ur c'hadavad amredat.

thyroxin binding pre albumin (TBPA) ◇ **thyroxin binding pre albumin (TBPA)** ◇ **ragalbumin** g. **tiroksinlenus (RATL)** (sl. *transthyréine*).

thyroxine ◇ **thyroxin (T4)** ◇ **tiroksin** g. (sl. *thyroïdiennes : hormones* ~).

thyroxinémie ◇ **thyroxinemia** ◇ **gwadtiroksinegezh** b. Bezañs tiroksin er gwad.

thyroxinien ◇ **thyroxinic** ◇ **~tiroksin, tiroksinel** aa. A-zave d'an tiroksin.

tibia ◇ **tibia** ◇ **skin** b. Askorn pennañ ha kreizel ar c'har, kenvellet e krec'h ouzh an askorn vorzhed, en traoñ ouzh an askorn fer hag en diavaez ouzh ar spillhenn.

tibia en fourreau ou en lame de sabre ◇ **sabre tibia** ◇ **skin sabrennek** Disneuiziad ar skin, dezhi un argrommed en argein araok-diavaez hag un arblated kostezel. An arbenn a vez ar sifiliz pe al lec'h.

tibia vara ◇ **tibia vara Blount's disease** ◇ **tibia vara, kleñved g. Blount** Osteokondroz skodenn greizel ar skin, o tarvezout etre 10 ha 14 vloaz. Devoudañ a ra un distummadur penn uhelañ ar skin, ken ma link hennezh war ziaevaz o variañ ar c'har war ziabarz (glin daskamm).

tibial ◇ **tibial** ◇ **1 ~skin, skinel** aa. **2 a-skin** aa. 1 A-zave d'ar skin. — *tos ar skin* : sl. *choc tibial*. 2 Nes d'ar skin. Skouerioù : talmerenn (araok, adreñv) a-skin (Gl. *artère tibiale (antérieure, postérieure)*), kigenn a-skin (araok, adreñv) (Gl. *muscle jambier (antérieur, postérieur)*), nervenn a-skin (Gl. *nerf tibial*).

tibial antérieur : syndrome ~ ◇ **anterior tibial syndrome** ◇ **azoniad** g. **tirenn ar gignenn a-skin araok** Hollad an erzerc'hadoù diwar ur muiadur eus an amwask ha da heul un heskwad er gignenn a-skin araok, e-barzh tirenn andastenn araok-diavaez ar c'har, diwar un embreg kigennel re start pe divoas evit ar bevedeg (hep goudonerezh pe emdommañ a-rakwez). An kez anaf a rekiz un lientirennenbenañ dangroc'h en diwar zifra war-benn lemel an amwask (sl. *compartmental : syndrome* ~, *syndrome de compression des loges, syndrome de loge*).

tic ◇ **tic** ◇ **skruz** g. **-ioù** Fiñv ezreol, andiarvenn, trumm, spanaus, diwar argrezad andiarvenn un pe lies kigenn. Steuziañ a ra e-doug an hun ha reoladus eo betek ur poent e-pad ur prantad gant ar youliñ.

tics : maladie des ~ ◇ **Gilles de la Tourette's disease, Tourette's syndrome** ◇ **kleñved g. ar skruzioù, kleñved Gilles de la Tourette** Anaev dianav e arbenn, o teraouiñ er vugeliezh, oc'h erzerc'hañ dre lies skruz loc'hadel kevredet gant drec'hluzañ ha kaoc'heuriañ. Lies gouzrec'h tizhet gant ar c'hleñved-se o devez ivez ur strafuilh eus an evezh gant un usniñv.

tics douloureux de la face ◇ **face ague** ◇ **skruzioù laurus an dremm** Seurtad nervost an dremm, naouus dre varradoù grizias, kevredet gant argrezadoù andiarvenn kigennoù ar rannbarzh tizhet.

tierce : fièvre ~ ◇ **tertian fever** ◇ **terzhienn** b. **dredeek** Terzhienn spanaus dezhi barroù o tistreiñ an trede deiz, etrezo un entremez eus un devezh (sl. *double tierce : fièvre* ~ ha *doublée : fièvre tierce* ~).

- Tietz** : **syndrome de** ~ ◇ **Tietz's syndrome** ◇ **azoniad g. Tietz** Teskad ar c'hammneuziadoù treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, o c'hoarvezout dreist holl eus bouzarded, albinegezh, nistagmuz, iswe an divabrant.
- Tietze** : **syndrome de** ~ ◇ **Tietze's disease** ◇ **azoniad g. Tietze** Azoniad naouus dre ur c'hoefvadur laurus eus un pe lies migorn kostezenn, o trediñ ent emdarzh d'ar pare dindan un nebeut sizhunioù pe vizioù.
- Tiffeneau** : **épreuve de** ~ ◇ ◇ **prouad g. Tiffeneau** Muzuliañ an ec'honad ec'hanalañ helc'het uc'hek e-doug kentañ eilenn un ec'hanalad helc'het.
- Tillaux** : **manœuvre de** ~ ◇ **Tillaux's manoeuvre** ◇ **embregad g. Tillaux** Embregad amkanet da lakaat war wel glenell ur yoc'henn eus ar vromm ouzh kigenn vras ar brennid : heloc'hded ar yoc'henn war an talennoù don a vez laieat pa vez lakaet kigenn vras ar brennid da argrezañ, en ur herzel ouzh fiñv nesaat brec'h ar c'hlañvour.
- Tilling-Wernicke** : **syndrome de** ~ ◇ **Wernicke's pseudo-ophtalmoplegia** ◇ **azonad g. Tilling-Wernicke** Seizi fiñvoù diarvenn ar sell en holl zurc'hadurioù ; ul lagadseizi eo devoudet gant tizhad parzh adreñv eil troenn dal krenn an empenn. Kevredet e vez a-wechoù gant ur seizi eus vennerioù an dremm, trigevell ha goudeodel.
- timbre** ◇ **patch** ◇ **pegsun g. -ioù** Arveret evit diounit un danvezenn dre an hent treuz-kroc'hen diwar-bouez un doare teltan pegus, evel ur geduzenn (an tuberkulin, da skouer), pe ul lia (an trinitrin, an nikotin, un hormon).
- TIMI** : **score** ~ **de perfusion coronaire** ◇ **TIMI (Thrombolysis In Myocardial Infarction) flow score** ◇ **live g. TIMI an erfenn kurunerel** Andalad e rezh un niver eus derez an anforzh talmerel hervez ar c'hurunerluniñ : live 0 : ezvezañs a erfenn ; live 1 : erfenn izel (talmerenn steviet) ; live 2 : erfenn diglok ; live 3 : erfenn klok (talmerenn hedrez).
- tinea albigena** ◇ **tinea albigena** ◇ **tinea albigena** Dermatoz arsellet er Reter Pellañ, naouus dre an dilivegañ hag an hiperkeratoz eus palvoù an daouarn ha solioù an treid, ha dre buzuilhded an ivinoù. Devoudet eo gant ur foue, *Glenosporella albicans*.
- tinea flava** ◇ **tinea flava** ◇ **tinea flava** Dermatomikoz paot er Reter Pellañ, leteñvel ouzh ar *pitiriaziz marellet*.
- tinea nigra** ◇ **tinea nigra** ◇ **tinea nigra** Dermatomikoz trovanel ar palvoù hag ar solioù, a liv arzu, diwar *Cladosporium wernecki*.
- Tinel** : **signe de** ~ ◇ **Tinel's sign** ◇ **arouez b. Tinel** Kiziata an nervenn kreizer, war barzh diavaez talbenn araok an arzorn, a zevoud kemenerion laurus e rannbarzh an dorn nervaouet gant an nervenn-se, e degouezh azoniad kanol an arzorn.
- TINU** : **syndrome** ~ ◇ **TINU (Tubulo Interstitial Nephritis Uveitis) syndrome** ◇ **azoniad g. TINU, azoniad LPEG (lounezhad pibellentremezel-gwazhiedsaefo)** Kevredet dibaot gwazhiedsaefo ha lounezhad pibellentremezel lemm. Marteze ez eo allergek an orin anezhañ.
- tiques** ◇ **ticks** ◇ **tarlask s., tarlaskenn b. -ed** Anvad boutin Iksodideged 'zo eus ar genadoù *Dermacentor*, *Ixodes*, *Ornithodoros*, *Rhipicephalus* a zevoud ar brazhad anezho, dre dredizhañ, poreoù diseurt diwar viruz, riketsiozoù, terzhiennoù arreadek (borreliozoù).
- tirage** ◇ ◇ **entenn g.** Pukadenn speur ar brusk us- pe is-klerenn, e-kerz an enanaladoù kreñv, pa vez enteñ an aer er brusk astalet gant un skoilh trelloc'hel.
- tiroir** : **signes du** ~ ◇ ◇ **arouezioù l. (b.) an diretenn** 1 Arouez gaougenvell gouzoug an askorn morzhed : war ar gloazed en e goazez e c'haller devoudañ ur fiñv monedone dre sachañ war ar vorzhed ha dre he advoutañ. 2 Arouez rog stagelloù e kroaz ar glin : hennezh o vezañ pleget, e c'haller goulankañ da dalpenn ar skin finvoù araok-adreñv ezreol, e-keñver arskodennoù an askorn morzhed.
- tisane** ◇ **infusion** ◇ **tizan g.** Glec'hiad pe anvervad tanav kenan un danvezenn liael struzhel, diounezet tomm pe yen, war-benn disec'hediñ, kevararzañ ar c'hweziñ hag alies skoazellañ gwered liaoù gwezhusoc'h.
- tissu** ◇ **tissue** ◇ **gwiad g., gwiadenn b.** Stroll kelligoù unrezh dezho an un arc'hwel. Bez' ez eus pevar bonrizh : epitelel, kenglenel (ennañ ar gwad, an askorn hag ar migorn), kaherel ha nervel. Arverañ a reer an termen *gwiad* er par rummennel (goubarel, hollek) hag an termen *gwiadenn* er par hiniennel (louer, dibarek). Da skouer : an *epitelienn* zo ur gwiad (rummennel, hollek), tra ma tistruj an tanezer ur wiadenn (dibarek).
- tissu compact** ◇ **compact substance** ◇ **steuñvenn b. stank** Gwiad askorn amparet gant lavnennoù askorn, harpet start an eil re ouzh ar re all, hep kavennoù etrezo.
- tissu spongieux** ◇ **spongy substance** ◇ **steuñvenn b. spoueek** Gwiad askorn, ouzh e ober ur rouedad a dilhennoù etrezo kavennoù munut kehent kenetrezo leun gant ar mel eskern. Bezant e vez e-barzh talpennoù an eskern hir hag etre kaennoù an eskern berr ha plat.
- tissue polypeptide antigen (TPA)** ◇ **tissue polypeptide antigen (TPA)** ◇ **antigen g. gwiad el polipeptidek (AGP)** An AGP zo ur merker neridigezh kelligoù, deurus er yoc'hennnoù enno ur gedrann epitelel. Spesadel eo evit ar c'hitokeratinou 8, 18, 19. Evit dezventañ an TPA e vez arveret antikorfou monoklonel ha kalvezderioù skinhangaezvezentañ pe hangaeluc'hventañ.
- titillomanie** ◇ **titillomania** ◇ **kravvar g.** Doug kleñvedel diharzadus da skrabañ.
- titine** ◇ **titin** ◇ **titin g.** Polipeptid uhel e dolz mol, bezant e kaherwianoù ar gigenn rizennek, ma kendaol da zastennegezh ar gigenn dre eren ar rizennoù Z ouzh edañvoù tev ar sarkomer.

T_{mPAH}* ♦ **T_{mPAH}*** ♦ **T_{mPAH}*** Kementad trenken baraaminohipurek uc'hek a c'hell ar pibelloù lounezh degorzhañ en ur munud. Ar werzhad keitad a vez 77,5 mg, ha kenfeuriek eo da niver ar pibelloù oc'h arc'hwelañ el lounezh.

TNF ♦ **Tumour Necrosis Factor** ♦ **TNF** (sl. *cachectine* ha *lymphotoxine*, *facteur cytotoxique*, *facteur de nécrose tumorale bêta*, *TNFβ*).

TNM ♦ ♦ **TNM** Berradur arveret gant ar gankrouion evit notañ, e degouezh a yoc'henn yud (T, Sz. *tumor*), ar gwerblennoù — mar bez — (N, Sz. *nodes*) hag an dasseziou (M, Sz. *metastases*), ouzh pep lizherenn ur gwezhiader niverel.

toc ♦ ♦ **strafuilh g. mac'hennel** Strafuilh devoudet gant an enkreuz, naous dre mac'hennou, dezevoù aloubus a zec'han aon hag enkreuz, realoù mac'hennel, evel ur c'hoant diharzadus da ren realoù arreat (*mac'henn arreata*) pe greadoù bred evel niveriñ, dibunañ ur frazenn ent dezevel.

topographie ♦ **topography** ♦ **krozhwezañ** Lerc'hwezañ kevregat argrezadoù ar grozh.

toxicologie ♦ **toxicology** ♦ **amiegouriezh b.** (sl. *obstétrique*).

tocolyse ♦ **tocolysis** ♦ **tokoliz g.** Heudiñ argrezadoù ar grozh vec'hiek.

tocophérol ♦ **tocopherol** ♦ **tokoferol g.** Vitamin E druzenn dileizh, bevret er gouennañ bonan, kavet en eouliou struzhel, en amanenn hag er vioù.

Todd : **paralyse de ~** ♦ **Todd's paralysis** ♦ **seizi g. Todd** Ledseizi berrbad o tarvezout war-lerc'h ur barrad droukfell jaksonek lec'hiek.

Togaviridae ou **togaviridés** ♦ **Togaviridae** ♦ **Togaviridae** Kerentiad viruzoù dezho ur RNA unarrevell, a gemparzhgezh ugenttuek, a vleinegezh vuie, an togaviruzoù, dezho un treuzkiz etre 30 ha 40 nm, o kenstrolañ o c'hapsid e kitoplasm ar gellig poreet. Er c'herentiad-se e kaver dreist holl ar genad *Alphavirus* (a-gent, *Arbovirus* a 'r stroll A). Er genad-se emañ : ar viruz chikungunya, treuzkaset gant moustiked eus ar genad *Aedes*, o tevoudañ en Afrika hag en Azia arzostou, kevret gant terzhienn ha yazed; viruzoù an empennfoioù marc'hel; ar viruz onyongyong, kiriek en Afrika d'un anaez nes d'an deng. An tri genad all zo ar *Rubivirus* (ruzig), ar *Flavivirus* (terzhienn velen ha deng) hag ar *Pestivirus* (antreuzkasadus d'an den). An daou c'henad diwezhañ zo bet lamet eus kerentiad an *Togaviridae* evit bezañ staget ouzh hini ar *Flaviviridae*.

tokélau ♦ **tokelau**, **tinea imbricata**, **Chinese ringworm** ♦ **tokelao g.** Kroc'henad gourc'hennus, debonus kenan, a furm war ar c'hroc'hen kelc'hioù kengreiz o kenskejañ kenetrezo ha goleiñ an amwiskadoù gant tresadennoù iskis. Hebiat d'ar vrigenn e tisleber an tokelao an ivinoù, avat. Devoudet eo gant ur seurtad *Aspergillus*, al *Lepidophyton* pe *Trichophyton concentricum*, a zo feltradur ar mikeliom anezhañ o chom dalc'hmat e skantennoù an ezkroc'hen. Paot kenan eo an anaez-se e Geverdazia.

tolbutamide : **test de tolérance au ~** ♦ **intravenous tolbutamide test** ♦ **prouad g. gougumer an tolbutamid** Studi ar glukozwadisvec'h dec'hanet dre ensinkladur engwazhiennel 1 g tolbutamid (DCI) (sulfamid glukozwadisvec'huis). Gant ar gouzrec'h bonan, a-benn 30 min, e leia ar glukozwadvec'h eus 0,50 g (pe 2,8 mmol) dre litr; gant an diabeteg e leia nebeutoc'h (0,20 g pe 1,1 mmol ent keitad), hogen digreskiñ a ra hiroc'h (ouzhpenn 90 min). Anfeleu ha dispredet eo ar prouad-se.

tolbutamide-glucose : **test ~** ♦ **tolbutamide-glucose test** ♦ **prouad g. tolbutamid-glukoz** Keñveriañ etre ur prouad glukozvec'hiañ klasel hag unan all goude ensinkladur engwazhiennel ur sulfamid glukozwadisvec'huis (tolbutamid) gant an doenad 10 mg dre gilogramm tolz korf. Diwar-bouez an kez prouad ez imboure'her barr arc'hwelel an ilgreiz, eleze ar c'hadavad insulin anezhañ. Dispredet eo avat.

tolérance ♦ **tolerance** ♦ **gougumer g., gougumerusted b.** Barregezh ar bevedeg da ziuzañv hep gwered diaezus diounezadoù danvezennoù kimiek pe mezegadurioù dre wezherioù fizikel. Gant al lostger *-usted* e vuker al live gougumer, ar pennanor o verkañ un ober.

tolérance à l'héparine in vitro : **test de ~** ♦ **Waugh-Ruddick test** ♦ **prouad g. gougumer ouzh an heparin in vitro** Prouad oc'h andalañ, *in vitro*, kaouledusted vloc'hel ar gwad. Lizh da J.-P. Soulier : "Ar prouad a c'hoarvez a vuzuliañ padoù kaouledañ pevar standilhon 0,5 mL an un plasma oksalatet hag adrazeaket e diraez a) 0; b) 0,3; c) 0,7 ha d) 1 unanenn heparin dizolc'het e 0,1 mL dileizhad kengrennek". Azdodiñ heparin a laka an dazgwered da vezañ kizidikoc'h dre c'horrekaat ar buanez kaouledañ ha dre greskiñ ar forc'hadou etre ar gwerzhadoù bonan hag ar re gleñvedel. An kez pad, keñveriet atav ouzh hini ur plasma test a verra e degouezh tromboz, a hira e degouezh olpladanou ha, dreist holl e degouezh hemofiliezh. Ar prouad a gearaez heuliañ disoc'hou ar mezegadurioù enepkaouledañ.

tolérogène ♦ **1 tolerogenic** **2 tolerogen** ♦ **1 hangaec'hougemerieat** aa. **2 hangaec'hougemerieat g. -où** 1 En araez da zeren d'ar gougumer hangaeel. 2 Molekul (seurtad antigen) o teren d'ar gougumer hangaeel e-lec'h devoudañ furmidigezh antikorfoù, evel ma ra boas an antigenoù.

Tolosa et Hunt : **syndrome** ou **ophtalmoplégie douloureuse de ~** ♦ **Tolosa-Hunt syndrome** ♦ **azoniad g. Tolosa-Hunt** Lagadseizi laurus kirieget ouzh un argerzh granulomatus er god keviaoek. Argazia a ra ent emdarzh en un nebeut sizhunvezhioù, hogen adfeilhañ a ra alies, en ervez da lezel arlenadoù lagadel grevus. Gweredus kenan eo ar c'haengurañ.

tometeux ♦ **tomentous** ♦ **dumvanek** aa. A-zivout ur c'horreenn, goloet gant gwianoù berr ha start evel dumed.

tomographie ♦ **tomography** ♦ **1 haenluniñ** **2 haenlun g. -ioù, haenlunad** 1 Hentenn skinimboure'h o kevaraezañ kaout skinlun ur skejenn danav don pe donoc'h eus ar c'horf. Diazezet eo war loc'h diaser mammenn ar skinoù X hag ar film e-keñver ar gouzviad. Dilezet eo mui pe vui an haenluniñ e gounid ar *skinerluniñ*. 2 Ar skeudenn dewerc'het gant an haenluniñ.

- tomographie d'émission gamma** ◇ **gamma-rays emission transaxial tomography** ◇ **γ-haenluniñ** (sl. *gammatomographie*). — **haenluniñ dre ec'hodiñ pozitron** (Gl. *tomographie par émission de positons*, TEP Sz. PET) : araezad leteñvel ouzh an hini a-raok, hogen diazezet war al lerc'hwezadur, diwar-bouez ur c'hamera arbennik, eus an daou skinad γ dedaolet gant kengej ur pozitronenn hag un elektronenn.
- tomophotographie** ◇ ◇ **haenluc'hskeudenniñ** Araezad leteñvel ouzh ar skinluc'hskeudenniñ, anezhañ luc'hskeudenniñ ar skramm skinselliñ, ma emañ bannet ar skeudenn c'hounezet dre haenluniñ.
- tonaphasie** ◇ **tonaphasia** ◇ **tonanenluz g.** Koll ar galloud da enluzañ, da zakkounañ un ton, diwar un anaf empennel.
- tonicité** ◇ **tonus** ◇ **tant g.** Stad vonan a stenedd pad ur gwriad pe un organ, ar c'higennoù pergen, dindan hol an nerved kreiz ha trobarzh.
- tonique** ◇ **tonic** ◇ **1 tantel aa. 2 tantek aa. 3 usreüs aa., usreer aa. & g. -ioù** 1 A-zave d'an tant 2 Gant tant, a-zivout un argrezad padek, gliziennoù o tevoudañ ur stad a reuted. Kevenebet ouzh *kridek*. 3 O fraouaat hag o kreñvaat ar bevedeg.
- tonisme** ◇ **tonic spasm** ◇ **tantegezh b.** Glizienn, andag tantek, padek a-walc'h, o tevoudañ ur reuted hogos trebad, troc'het a-wechoù gant stroñsadoù.
- tonofibrille** ◇ **tonofibril** ◇ **tantwian g.** Anvet ivez kitokeratin, ur rizh keratin enkitoplasmel e rezh edañvoù, o furmiñ ar c'helligatel, ent dibarek hini ar c'helligoù epitelem (lakaet e-barzh ar glaourgennoù hag ar gwagrennoù), hag ivez an ivinoù, ar blev. Ar monomeroù kitokeratin zo eret kenetrezo dre volekul filagrin. Arc'hwel pennañ an tantwianoù zo amparañ framm teirment diabarzh ar gellig. Parzhek e golo ar gellig hag er sarkomeroù ez amparont ur gael reut a vir ouzh ar garvevion a enteñ hag a azdalc'h an dour er c'helligoù evit hepkoriñ an dourisvec'h kelligel. Dasperzhiañ a reont ivez e juntadoù etrekelligel 'zo (desmozomou).
- tonofilament** ◇ **tonofilament** ◇ **tantedañv g.** Elfenn barzhiat an tantwian, hewel hepken dre ar c'horrgresker elektronek. Ar protein amparadel anezhañ a c'hell bezañ ar c'hitokeratin (kelligoù epitelem), an desmin (kelligoù kaher), ar vimentin (kelligoù mezenkimatus).
- tonographie** ◇ **tonography** ◇ **gwaskwezañ, tonografiñ** Lerc'hwezañ kevregat argemmoù ar gwask, ent dibarek ar gwask enboullel.
- tonolyse** ◇ **osmotic lysis** ◇ **tonoliz g.** Daralladur ar c'helligoù devoudet gant argemmoù ar grenn eus ar metoù ma vevont.
- tonométrie** ◇ **tonometry** ◇ **gwaskventañ, gwaskventerezh g.** Muzul ar gwask, talmerel, gwazhiennel, korrwazhiedel, lagadel, h.a. Evit ar gwask enboullel ez arverer un *tonometr* hag evit talmerenn greiz al luc'hsae, un *angiotonometr*.
- tonoscopie** ◇ **tonoscopy** ◇ **lagadwaskventerezh g., tonoskopiñ** Diwar-bouez an oftalmoskop, imboure'h poulzadennoù talmerennoù al luc'hsae devoudet gant gwaskadenn al lagadwaskventer war lersae diaraezet ar gouziviad.
- tonotrope** ◇ ◇ **kaherdantel aa.** A-zivout an tant kaherel.
- tonus** ◇ **tonus, tonicity** ◇ **tant g., tantañ** Stad trebadek a vonwezhierzh eus ar c'higennoù levn ha rizennek hag eus nervgreizennoù 'zo : tant kaherel, tant an nervgreizennoù gwazhiedstrishaat, kalonisteñ hag -usteiñ.
- topectomie** ◇ **topectomy** ◇ **leurezvenañ** Dazbidañ, untu pe daoudu, tachadoù 'zo eus pluskenn an empenn (raogtael, trogarnek, a-bod, h.a.), en un amkan brediyac'hadel (sl. *psychochirurgie*).
- topholipome** ◇ **topholipoma** ◇ **tofolipom g.** Lipom ennañ tofuzoù, arsellet a-wechoù gant an urlaoueion.
- tophus** ou **concrétions tophacées** ◇ **tophus** ◇ **tofuz g. -où** Fetisaennoù trenkenn urek pe urat natriom dindan ar c'hroc'hen, diwar un daralladur kennevidel eus ar bazennoù purek (sl. *goutte*).
- topique** ◇ **topic** ◇ **1 lec'hwezhus aa., lec'hwezher aa. 2 lec'hwezher g. -ioù, lec'hangevezh g. -ioù** 1 O werediñ war al lec'h ma 'z eo bet arloet 2 Lia lec'hwezhus.
- topo-algie** ◇ **topoalgia** ◇ **lec'host b.** Laur fest hep bezañ e dalc'h un tiriad resis, gouzañvet gant an neurasteneion pergen, a-ser ar peurliesañ gant erzerzh'hadou neurastenek all. — **lec'host diastal grezvarrek** (Gl. *t. continue paroxystique*) : laur lec'hiek kreñv kenan da vare ar grezvarroù.
- topognosie** ◇ **topognosis** ◇ **emlec'hzenaoud g.** Galloud da zelec'hiañ an eraezadoù stekiñ war ar c'hroc'hen ha ne vern pelec'h er c'horf.
- topo-isomérase** ◇ **topoisomerase** ◇ **topoizomeraz g.** Enzim en araez da dreuzfurmiñ un izomer eus an DNA en unan all dre zigeriñ ha serriñ an ereoù fosfodiester. An topoizomeroù eus ar rizh I a wered war ur widenn DNA hepken, ha re eus ar rizh II war an div widenn. Tolc'herioù 'zo eus an topoizomeroù a vez arveret er yac'haat (antraklinoù, kinolonou) (sl. *isomérase* ha *hélicase*).
- Topolanski : signe de ~** ◇ ◇ **aruez b. Topolanski** Darwazh kreñv pe greñvoc'h ar gevresae, arsellet e kleñved Basedow. An neuz a c'hell bezañ pe ur walenn dro-gornsae, pe ur steredenn beder brec'h o klotañ gant enlenvaou ar peder c'higenn eun.
- topophylaxie** ◇ **topophylaxis** ◇ **lec'hergost g., lec'hergostañ** Mod ensinklañ engwazhiennel, amkanet da hepkoriñ ar riskloù a zo oc'h enteñ danvezennoù liael 'zo. Al liamm kaoutchoug stalet en argrec'h ar poent ensinklañ a vez distardet a-benn un nebeut munutennoù ha gorrek kenan. E-se e tewerc'her ur skignañ gorrek eus al lia, ha hepkoriñ dre se an erwezhoù bleuzel.
- topotomie** ◇ ◇ **leurenbenañ** Skejañ surjanel gwiennou gwenn an empenn, kenstur d'ar bluskenn hag a-stok outi. Embreget e tachadoù 'zo, leteñvel eo an ennegadoù anezhañ ouzh re al leurezvenañ.

- TORCH** : **syndrome** ~ ◇ **TORCH syndrome** ◇ **azoniad g. TORKE** Avufelc'husvent gant ikter hag elbladanoù gant an nevezc'haned, a-zalc'h gant ur poread diwar toksoplasmoz, ruzig, kitomegaloviruz pe eror.
- Torelli** : **triangle de** ~ ◇ ◇ **tric'horn g. Torelli** Demerenn dric'hornek unvan lez-klerenn dehou, a vez gwelet a-wechoù war skinklunioù a-dal ar brusk. Emañ an diaz anezhañ e live ar c'hentañ migorn kostezenn dehou hag an tu diavaez anezhañ, a-veskell war draoù ha war ziabarzh, a dizh teñvalenn al livenn e par an eil tachad etre-kostoù dehou. An kez demerenn a glot gant ar stagell glerenn-kestad-amgalonenn.
- Torkildsen** : **opération de** ~ ◇ **Torkildsen's operation** ◇ **oberatadenn g. Torkildsen** Amdreugañ al liñvenn benn-keim (LPK) eus ar c'hambroù kostezel etrezek an oglenn ilpenn-mel, dewerc'het e degouezh dardenn ar c'hambroù kostezel da heul stankadur an toulloù etre-kambroù (sl. *dérivation du liquide céphalorachidien (LCR) dans l'hydrocéphalie*).
- Tornwaldt** : **angine de** ~ ◇ **Tornwaldt's disease** ◇ **gorank g. Tornwaldt** Maeloù drek-fri henek, sezet en unan eus asplegoù hueg ar c'hargadenn, ent dibarek en aspleg kreizer.
- torpide** ◇ **torpid** ◇ **diek aa.** A-zivout ar goulioù, an angreizhoù, an anafoù ha seurtadoù anaезioù zoken, a zedro gorrek kenan hep tuadur erzerc'h da wellaat pe da c'hrevusaat.
- torsades de pointes** ◇ **twisting spikes** ◇ **gweadennoù l. (b.) pikoù** Furm grehad kofigel o naoùñ, war ar c'halonvarrwezd, dre gemplezhioù QRS dezho un ahel o kemmañ ent argammedek, ken ma hañval, en amdreugadoù 'zo, ar gemplezh kofigel gweañ en dro d'an diazregenn. Erzerc'hañ a ra ent klinikel dre ezwaloù trumm arreat, gant dianlenadoù garv a-wechoù.
- torticolis** ◇ **torticollis** ◇ **penngamm g.** Gweadur ar gouzoug gant ar penn stouet, kevret gant laurioù kaherel. — **penngamm kigennel** (Gl. *t. musculaire*) : diwar angrizadur ar gigenn glerenn-brennigenn. — **penngamm skouarnel** (Gl. *t. auriculaire*) : diwar un hegadur eus ar gigenn glerenn-brennigenn gant un anaf eus ar skouarn (skouarnfo linus). — **penngamm bredel** (Gl. *t. mental*) : skruz ar gouzoug arsellet gant bredklañvourion 'zo; naoùñ a ra dre ar varregezh evit ar c'hlañvour da beursonnaat e benn diwarbouez un araez dibabet gantañ. — **penngamm andagel** (Gl. *t. spasmodique*) : andag kigennoù ar gouzoug diwar un hegadur henek eus an adnervenn, a orin kreizel pe drobarzhel (sl. *botulique* : *toxine* ~). — Ar penngammoù bredel hag andagel a ve furmoù ar *midant drekwariet argammedek* pe *andag gweañ*. — **penngamm fric'hargadennel** : sl. *Grisel* : *maladie de* ~.
- torus mandibulaire** ◇ **torus mandibularis** ◇ **biell b. ar c'haved** Amdeñvenn askorn kemparzhsek sezet war dal diabarzh ar c'haved, e rannbarzh ar rakvalerioù.
- torus palatin** ◇ **torus palatinus** ◇ **biell b. ar stavn** Ec'haskornenn o valirañ e kreiz ar stavn askornek.
- toucher** ◇ **touch** ◇ **1 stekiñ 2 touch g., teuta** 1 Unan eus ar skiantennoù gorrefraouadel, galloudezh da verzhout an traezoù dre ar c'horf, ent dibarek gant an dorn. 2 Hentenn imboure'h ur gavenn naturel (youlc'h, gouin) gant un pe lies biz.
- Toupet** : **opération de** ~ ◇ **Toupet's operation** ◇ **oberatadenn b. Toupet** Kreuzkriazañ darnel adreñv traoñ an treizher amkanet da brederiañ ar gindrehent kreuz-treizher.
- tourillon** ◇ **trunion** ◇ **draen g.** Doare paoell arveret evit kenvellañ un amsteudell c'har ouzh ar votez.
- Tournay** : **réaction ou réflexe de** ~ ◇ **Tournay's sign** ◇ **damoug g. Tournay** Usvoll ar mab lagad o sellout war ziaevaz pa steud an daoulagad a-gostez e-pad un amzer bennak. Un anadenn vonan eo.
- tournoie** ◇ **runaround** ◇ **troell b.** Beskoul tro-ivin.
- tourniquet** ◇ **tourniquet** ◇ **sparl g.** Barrenn a droer evit stardañ ur rolt. Lavaret e vez ivez *sparl* evit an hollad *rolt + sparl* (Gl. *garrot, garrot tourniquet*).
- tout ou rien** : **loi du** ~ ◇ **all-or-none law** ◇ **reolenn b. holl pe vann** 1 Bez' ez eus, evit an hormonoù, un doead ma emañ mannel ar gwered anezho a-is dezhañ hag uc'hek diouzhtu a-us dezhañ. Arzalet e vez ar reolenn-se. 2 Er galonouriezh, forzh petore fraouadur arloet a-us d'ur gwehin bennak ez argrez ar galon penn-da-benn hag a-is ne argrez ket tamm ebet. — An kez reolenn a c'hell bezañ dedalvezet evit anadennoù bevedel all estreget argrezadur ar c'halongaher.
- toux** ◇ **cough** ◇ **paz g.** Ec'hanalañ a-daol, a-stroñs ha trouzus, gwech diarvenn, gwech damougek, devoudet ar peurliesañ gant un hegadur eus an nervenn dispis (anaezioù ar forzhioù analañ).
- toux bitonale** ◇ **double tonal cough** ◇ **paz daoudon** Paz gant daou son kevarall ha digenson war un dro, unan boud ha goloet, evez skiltroc'h ha torret. Arsellet e vez e degouezh a amwask briant-bronkez.
- Townes-Brocks** : **syndrome de** ~ ◇ **Townes-Brocks syndrome** ◇ **azoniad g. Townes-Brocks** Azoniad kammneuziad el dibaot, treuzkaset er mod aotzomek trec'hek, o kevredañ un andigor eus ar fraezh, ur vouzarded, ezreolderioù ar meudoù (trioeñsegezh, gaolegezh) hag ar bizied troad.
- toxémie** ◇ **toxaemia** ◇ **gwadpistriegezh b.** Bezañs er gwad eus toksinoù endeuat pe ezdeuat diwar peur- pe darnskorted an organoù kefridiet d'o zreuzfurmiñ ha d'o ezvevennañ.
- toxémie gravidique** ◇ **toxaemia of pregnancy** ◇ **gwadpistriegezh ar vec'hiegi** Lounezhad o tarvezout e-doug an tri miz diwezhañ eus ar vec'hiegezh, gant erzerc'hadoù gwazhiedel ha lounezhel : troazhalbuminegezh, gouliñvoù, uswask talmerel. Devoudet eo gant un heskwad torzhiennel, en ervez da zisoc'h gant ur barrad eklampsiezh.
- toxicité** ◇ **toxicity** ◇ **1pistriegezh b. 2 pistriusted b.** 1 Perzh un danvezenn da bistriañ ur bevedeg, andalet ar peurliesañ dre an doead izek en araez da lazhañ ul loen 1 kg. 2 Galloud pistriañ un danvezenn.

- toxicocinétiq** ◇ **toxicocinetics** ◇ **pistrigorzhoniezh** b. Studi devoned ar pistrienoù anliaek pe al liaoù a zoenad pistrius (a-gevenep d'al liagorzhoniezh) er bevedeg.
- toxicologie** ◇ **toxicology** ◇ **pistriouriezh** b. Diskiblezh o plediñ gant ar pistriou.
- toxicomane** ◇ **toxicomaniac** ◇ **1 drammgaezhiat** aa., **kaezhiat** **2 drammgaezhiad** g. -ed, **kaezhiad** 1 Gant un drammgaezhiadezh. 2 Gouziviad drammgaezhiat.
- toxicomaniaque** ◇ **toxicomaniac** ◇ **drammgaezhiadel** aa., **kaezhiadel** A-zave d'an drammgaezhiadezh, d'ar gaezhiadezh.
- toxicomanie** ◇ **toxicomania** ◇ **drammgaezhiadezh** b., **kaezhiadezh** Stad a bistriadur mareadek pe henek dec'hanet gant bevezadur arreat un dram (naturel pe kevanaozel), a-ser gant ur c'hoant andistrec'h, un ezhom, un endalc'h da gendrec'hel da vezeziñ an dram ha d'e bourchas koustet a gousto, gant an tuadur da greskiñ an doenoù ha da heul devoudañ un estoue bredel ha fizikel (alies) ouzh gweredoù an dram.
- toxicomanogène** ◇ **addictive** ◇ **drammgaezheiat** aa., **kaezheiat** A zec'han un drammgaezhiadezh.
- toxicophore** ◇ **toxiferous** ◇ **toksikofor** aa. A-zivout al loened (ent dibarek ar pesked) a c'hell emvagañ gant danvezennoù pistrius evit an den, en araez da zec'han pistriadurioù grevus pe c'hrevusoc'h pa vezont debret.
- toxicose** ◇ **toxicosis** ◇ **toksikoz** g. 1 Pistriadur endeuet devoudet gant danvezennoù argevezus danzeet er bevedeg (sl. *intoxication*). 2 *Toksikoz lemm ar vagadell* : anaez naous dre un azoniad leteñvel ouzh hini ar *pervezfo koleravane* ar *vabaned*, gant un दौरisvec'h muiek (sl. *choléra infantile, entérite cholérimforme*).
- toxicovigilance** ◇ ◇ **pistrigost** g., **pistrigosterezh** g. Eveshaat an anadennoù pistriel o tarvezout en ur boblañs.
- toxidermie** ◇ **toxiderma** ◇ **toksiderma** g. Kroc'henad pistrienn (sl. *bromodermie, bromide*).
- toxidrome** ◇ **toxidrome** ◇ **toksidrom** g. Azoniad pistrienn.
- toxie** ◇ **toxie** ◇ **toksi** g. Unanenn pistrigezh : kementad liñvenn bistriek, ensinklet er wazhienn, en araez da lazhañ diouzhtu ur c'honikl 1 kg.
- toxigène** ◇ **toxigenic** ◇ **toksineiat** aa. O c'henel toksinoù, dreist holl a-zivout garvevion 'zo.
- toxi-infection** ◇ **toxiinfection** ◇ **pistribroad** g. Stad a bistriadur a 'r bevedeg diwar zanvezennoù pistriek borc'het gant garvevion 'zo. —Ar *pistribroadoù bouedel stroll* zo enskrivet war roll kefridiel ar c'hleñvedoù endalc'hek o diskleriañ (sl. *déclaration obligatoire : maladies à ~*).
- toxine** ◇ **toxin** ◇ **taksin** g. Anvad genadel evit an danvezennoù dezho gweredoù pistriell, ent dibarek an danvezennoù proteek a orin loenel, struzhel pe vakteriel, ar perzhioù pennañ anezho o vezañ dec'han gweredoù pistriell ha bezañ antigenus. Ar perzh diwezhañ-se a vroud furmidigezh antikorfoù (antitoksinoù) ha dedalvezet eo e danzeidigezh an anatoksinoù (sl. *anatoxine, entérotoxine, botulique : toxine ~*).
- toxinique** ◇ **toxicin** ◇ **toksinel** aa. A-zave d'an toksinoù.
- toxinogenèse** ◇ **toxinogenesis** ◇ **taksinbarañ** Furmiñ an toksinoù.
- toxique** ◇ **toxic** ◇ **1 pistriell** aa. **2 pistriek** aa. **3 pistrius** aa. 1 A-zivout ar pistrioù, evel an *anadennoù pistriell*, an *direizhoù pistriell* pe un anaez devoudet gant ur pistriadur (diwar ul lia, da skouer), evel ar *ferennlug pistriell*, ar *bleuz pistriell*, h.a. 2 Gant perzhioù ur pistri, evel an *adenomou pistriek*, an *danvezennoù pistriek*... 3 En ervez da gaout gweredoù ur pistri, evel un *doenad pistrius*, ar *pesked pistrius*, ar *foue pistrius*, h.a.
- toxocarose** ◇ **toxocaríasis** ◇ **toksokaroz** g. Erialerezh an den gant larved askariz ar c'hi hag ar c'hazh (*Toxocara canis*). Erzerc'hañ a ra ent klinikel dre un avuusvent, ur bronkezfo, ensilennoù skevent, ha goude dre un tolgennluc'hsaefo naouezennus. Bez' ez eus ur gwadeleozinofil uhel hag ur γ -globulinwadusvec'h. Yaek eo an entonnennervezh (sl. *larva migrans viscérale*).
- toxoiide** ◇ **toxoid** ◇ **toksoid** g. Aozad deveret diouzhtu un toksin, kuit a bistrigezh (distrujet eo ar stroll toksofor), a vir e hangaüstet avat (miret eo ar stroll haptofor).
- toxomimétique** ◇ **toxomimetic** ◇ **pistrivane** aa. (Danvezenn) a zo he gwered heñvel ouzh ur gwered pistriell savelet. — *damoug darblegadel pistrivane* (Gl. *réflexe conditionnel t.* : erwez ar bevedeg leteñvel ouzh an hini a ve dec'hanet gant un danvezenn gimiek diwar un damoug darblegadel.
- toxopachyostéose diaphysaire tibiopéronière** ◇ **tibioperoneal diaphyseal toxopachyostosis** ◇ **toksopakiosteoz** g. **treuzennoù ar skin hag ar spilhenn** Kammneuziad familhel eskern an divesker, naous dre ur c'hrommder dregargevek hag un tevadur eus ar skinoù hag ar spilhennoù; kevredet e vez alies gant un enaskadur eus pempet mellenn an dargreiz ha gant ur gorregezh.
- toxoplasme** ◇ **toxoplasma** ◇ **toksoplasm** g. -où Protozoenn a stumm gant ur greskenn (*Toxoplasma gondii*). — Ar gondi zo ur c'hriagner bihan en araez da dredizhañ an den hag al loened (toksoplasmoz). An toksoplasm ne c'hell bevañ nemet e-barzh ar c'helligoù bev.
- toxoplasmose** ◇ **toxoplasmosis** ◇ **toksoplasmoz** g. Kleñved arvevadel diwar ar protoplasm a dizh lies spesad loenel, o tevoudañ arzerc'hadou empennoel ha koazhadel. Gwazhet eo an den ivez a erzerc'h : pe *furmoù ganedigell* lemm o tedreiñ evel un empenmelfo, marvus pe dec'hanus da arlenadoù bredloc'hadel muiek (empennoeñ, glizi, razekadurioù enklopennel, tolgennkornsaefo); pe *furmoù arzeuat* : furmoù hollek marvus, fumoù lec'hiek (kroc'henel, gwerblennel, pilhonempennel, lagadel, arzel,

skeventel, h.a.), furmoù leiek pe diazon, paot kenan. Diournadur gwadveizel an toksoplasmoz zo endalc'hek e Frañs abaoe 1978, da-geñver imbourc'h rakpriediñ ar merc'hed dindan pemont vloaz.

Toynbee : *épreuve de* ~ ◇ **Toynbee's experiment** ◇ **proud g. Toynbee** Devoudañ ul leiadur eus ar gwask er fric'hargadenn ha da heul, o treledañ dre ar gorzenn glevedel, e kavenn an daboulin, diwar-bouez ul lonkadur goullou, ar genoù hag an divfron o vezañ serr. Proud gin hini Valsalva eo.

TPHA ◇ **Treponema Pallidum Haemagglutination Assay** ◇ **proud g. TPHA** Erwezhiad gwadveizel spesadel ha kizidik evit deznaouiñ ar sifiliz oc'h arverañ an treponem gwelw lazhet ha dazgludañ gouzañvat hemati an dañvad.

trabécule ◇ **trabecula** ◇ **kourzan g.** Kourzad bihan a ampar, dre genetredasforzhañ gant kourzаноu a un rizh, ur gwriad rouedek.

trabéculectomie ◇ **trabeculectomy** ◇ **kourzadevenañ** Gwezhiadenn gorrurjianerezh amkanet da brederiañ ar glaokom henek, anezhi dilemel luniadoù kourzadek god gwazhiennel al lersae. Daralladur ar rouedad kourzadek-se loet en ank kanevedenn-kornsae — a sil ent reol dourenn al lagad o tiverañ eus ar gambr araoek etrezek ar rouedad wazhiennel en dro d'al lersae — a skoillh evit gwir karzhadur dourenn al lagad.

trabéculotomie ◇ **trabeculotomy** ◇ **kourzadenbenañ** Skejañ surjiañel ar gourzadeg kornsae-lersae, amkanet da brederiañ ar glaokom. Erlec'hiañ a reer ur fic'h ouzh ar gourzadeg, o kevaraezañ dre se diver reol dourenn al lagad.

trabéculum cornéoscléral ◇ **corneoscleral trabecular meshwork** ◇ **kourzadeg b. kornsae-lersae** Furmadur korfadurel an ank kanevedenn-kornsae o c'hoarvezout eus ur rouedad (ar rouedad kourzadek), ennañ god gwazhiennel al lersae ha dezhañ ur c'hourfouezusted vevedel evel sil o wehenniñ dourenn al lagad.

trachabilité ◇ **traceability** ◇ **oliadusted b.** Teskad an diarbennou, skridoù, teuliadoù, restoù, h.a., a-zivout ur gouziviad, ul lia, stignadelloù, ensteudoù, h.a., o kevaraezañ heuliañ oliadoù an hennad.

trachéal inverse : **signe** ~ ◇ ◇ **arouez b. garloc'henn-briant gin** Uheladur ar briant hag ar c'harloc'henn da geñver pep lamm sistolel, arouez darvoll argein gwareg an aortenn.

trachée ◇ **trachea** ◇ **briant b.** Kanol granennek, migornek ha lienennek, loet er parzh araoek ha traoñ ar gouzoug hag e parzh krec'h ar bruski. Dont a ra da heul ar c'harloc'henn hag emrannañ a ra en he farzh traoñ e div bennvrongezenn.

trachée : **signe de la ~** ◇ **tracheal tugging** ◇ **arouez b. ar vriant** Stroñsad a-daol, eus an nec'h d'an traoñ, goulanket ouzh ar gorzenn c'harloc'henn-briant gant lammoù un darvoll eus gwareg an aortenn.

trachéite ◇ **tracheitis** ◇ **briantfo g.** Taniñenn ar vriant, kevredet alies gant ur garloc'hennfo pe ur bronkezfo.

trachelématome ◇ **trachelhaematoma** ◇ **gwatoñv g. ar gouzoug, gouzougwatoñv** Gwatoñv ar gouzoug amparet a-wechoù e gouin lientirenn ar gigenn glerenn-trebez-brennigenn gant an nevezc'haned, e dianlen un daraez kigenn e-kerz ar gwilioud; erzerc'hañ a ra dre ur goeñvenn hirvoan hag ur pennamm ha pareañ a ra ar peurliesañ dindan un nebeut mizvezhioù.

trachélisme ◇ **trachelism** ◇ **gouzougarrezañ** Argrezadoù dasstrizhek kigennoù ar gouzoug, en ervez da c'hoarvezout e barradoù droukfell 'zo, o tevoudañ un diaez a 'n analañ hag a 'n amred gwad. Alese lanvidigezh an dremm, ar rakweuzegezh ha dantadur an teod, h.a.

trachéoplastie ◇ **tracheloplasty** ◇ **gouzougatelviñ** Azneuziañ surjiañel gouzoug ar grozh.

trachéobronchite ◇ **tracheobronchitis** ◇ **briantbronkezfo g.** Briantfo kevredet gant bronkezfo. — *briantbronkezfo daredek* (Gl. *trachéobronchite fulgurante*) : anaec ar vagadelled hag ar vugale yaouank naoues dre un deroù trumm, un derzhienn uhel ha barradoù migañ gant ur stridor enanalañ, ur vouezh raouliet hag ur paz harzhadennek. Ar garloc'hennwereañ a laka war wel, dindan an tarz, borc'hadoù tev, gludek. Ar garvevion kiriek zo ar strepokok gwadloezus.

trachéocèle ◇ **tracheocele** ◇ **briantaervozhell b.** Yoc'henn aezhel e par ar gouzoug amparet gant ur fennad aer leiek kehent gant ar vriant.

trachéomalacie ◇ **tracheomalacia** ◇ **briantvlodad g.** Boukadur ar vriant dre zic'henezhadur behinel ar migern anezhi.

trachéopathie ostéoplastique ◇ **tracheopathia osteoplastica** ◇ **briantanaez g. askornweel** Treuzfurmadur ezreol migorn ar vriant hag ar bronkez e gwriad askorn. Sezet eo ar c'hleñved-se e par an endan-c'hlaourgenn, o tevoudañ dinodadur ur paz, skrouediañ gwad hag a-wechoù ur steviadur ouzh an analañ reol.

trachéoplastie ◇ **tracheoplasty** ◇ **briantatelviñ** Oberatadenn surjiañel amkanet da serriñ un igorenn vriantenbenañ pe da erlec'hiañ un imboud kroc'hen ouzh ur rann strishaet eus ar vriant.

trachéoscopie ◇ **tracheoscopy** ◇ **briantengweliñ, briantwereañ** Luc'hwereañ, luc'hengweliñ ar vriant diwar-bouez un ardivink heñvel ouzh al laringoskop, o tremen pe dre ar genoù, pe dre un igorenn vriantenbenañ.

trachéosténose ◇ **tracheostenosis** ◇ **briantivoll g.** Strishadur ar vriant.

trachéostomie ◇ **tracheostomy** ◇ **briantezforzhañ** Seurtad eus ar briantenbenañ, ma fester, dre ziv grafaeladenn a bep tu, speurioù ar boulc'h er vriant ouzh brielloù ar flañhad er c'hroc'hen.

trachéotomie ◇ **tracheotomy** ◇ **briantenbenañ** Skejañ surjiañel ar vriant evit parraat ouzh ur mogañ dre stankadur ar forzh ha kevaraezañ enteñ ur c'horzan er vriant, pe evel lankad kentañ ur briantengweliñ.

trachome ◇ **trachoma** ◇ **trakom g.** Komkevresaefo tredizhus a zedro henek, diwar ur bakteri bihan treuzkaset gant ar c'helien hag ar rikou emwalc'hiñ, *Chlamydia trachomatis*. Naoues eo dre furmadur bolc'hennou, dre un uswe begennel hag ur pannuz eus

ar gomsae, o tevoudañ anafoù kleizennel rizhek. Emañ en ervez da zisoc'h gant an dallder. Broreuziadek eo rannbarzhioù 'zo eus Afrika hag Azia, en Egipt pergen, ken ma komzer ivez a *lagadfo egiptat*, a *kevresaefo greunek*.

trachyonychie ◇ **trachyonychia** ◇ **ivinc'hreunegzh** b. Neuz greunek gorre an ivin.

traction ◇ **traction** ◇ **sachañ** Embreger un nerzh o tehedañ.

tractotomie ◇ **tractotomy** ◇ **stiradenbenañ** Skejañ ur stirad nervwiennoù en nerveg kreiz.

tractotomie pédonculaire spinothalamique ◇ **spinothalamic tractotomy** ◇ **stiradenbenañ livenn-derc'hvel** Skejañ stirad ar gwrez- ha laureraezhiñ e par an troad empenn.

tractotomie pyramidale mésencéphalique ou **pédonculaire** ◇ **pyramidal tractotomy** ◇ **stiradenbenañ pikernennek** Skejañ ar stirad pikernennek, forzh al loc'hañ, e par an troad empenn.

tractotomie trigéminal ◇ **trigeminal tractotomy** ◇ **stiradenbenañ trigevellet** Skejañ gwrizienn santout a-ziskenn an nervenn drigevellet en he zreug hirvel-livenn; gwezhiadenn ergemennet en dremmost (sl. *névrotomie*, *neurotomie*).

tractus ◇ **tractus** ◇ **stirad** g. Hordenn wiennoù, nerverl pe gaherel, loet war c'horre pe en ec'honenn ur parzh eus ar bevedeg.

traduction génétique ◇ **genetic translation** ◇ **treuzodiñ hilel** Enoaz ur polipeptid dre ezvonegañ (treuzodiñ) ar c'hemennad hilel douget gant an RNA kannad. An eil lankad eo eus treuzkasadur an hilstlennad, an hini kentañ o vezañ an treuzskrivadur.

tragus ◇ **tragus** ◇ **bouc'h** g. Teodenn vigornek loet dirak digor ode diavaez ar c'hleved.

training autogène ◇ **autogenous training** ◇ **emc'hourdonerezh** g. Hentenn delaoskiñ, dre arverañ an emc'houdreñ hag embregoù analañ.

trait ◇ **trait** ◇ **1 tres** g., **pleg** g. **2 reg** g. 1 Elfenn, doareenn, merk, pleg piaouel d'un dra, d'un hinienn, da skouer un tres pe ur pleg neuzid, ur pleg realezh. 2 Naouuster savelet ent hilel gant un pe lies genenn. Argemmadoù regoù 'zo a vez sellet evel bonan ha reoù all evel kleñvedoù, evel ar regoù enkilek bezant en ur furm allreek a gleñved hilel.

traitement ◇ **treatment** ◇ **yac'haat**, **kurañ**, **prederiañ**, **mezegañ**, **gwezheriañ** Hollad an araezioù yec'hedus, liael, surjiantel ha bredel arveret d'ober war-dro un den klañv, da glevout outañ, gant an amkan parañ pe zistav ar c'hleved. Hervez ar c'hemperzh e reer gant un termen pe un all, *-kurañ* o talvezout da lostger : *skingurañ*, *luc'hgurañ*, *bredgurañ*, h.a.

archées ◇ **tormina** ◇ **gwentloù** l. (g.) Poan gof, droug kof taer. — *gwentloù krozhel* : laurioù grizias sezet er grozh oc'h argrezañ war-lerc'h ar gwilioud evit ezvoutañ torzhienn ha kaouledennoù.

tranquillisant ◇ **tranquillizer** ◇ **habaskaer** aa. & g. **-ioù** Lia o tistav an enkreiz. Lakaet e vez kemm etre an *habaskaerioù* *leiek* (Gl. *t. mineurs*) pe *dienkrezerioù* hag an *habaskaerioù* *muiek* (Gl. *t. majeurs*) pe *nervisreerioù*, *neurolepteier*.

transaminase ◇ **transaminase** ◇ **transaminaz** g. **-ioù** Nep enzim o treluskañ an treuzdoug eus strolloù amin (–NH₂) an amindrenkennoù war drenkennoù ketonek pe aldehidoù (treuzaminadur pe dezaminadur), o tasperzhiañ evel-se e dispennadur ar proteinoù hag en enaozadur ar glukoz diwar danvezennoù anglikidek. Emañ an transaminazoù e gwiadoù diseurt gant bec'hioù kevarall; tremen a reont er gwad da-geñver anafoù gwiadel ha gallout a reer o dezventañ e rezh transaminaz glutamek-oksaloaketek (Sz. *glutamic oxaloacetic transaminase*, GOT. Anvet ivez *aspartat-aminotransferazoù ASAT*) hag e rezh transaminaz glutamek-piruvek (Sz. *glutamic-pyruvic transaminase*, GPT. Anvet ivez *alanin-aminotransferazoù ALAT*). Ar GOT (pe ASAT) a gresk ar gwadvec'h anezhañ e degouezh a angwazhiad ar c'haer kalon pe a anafoù eus kelligoù an avu. Evit ar GPT (pe ALAT) a gresk ivez ar wadvec'h anezhañ e degouezh a anaf lemm eus kelligoù an avu. Bec'h reol uc'hek an daou dransaminaz e-kerz an avufoioù pistriel ha porel zo par pe vihanoc'h eget 30 unanenn etrevroadel/L.

transamination ◇ **transamination** ◇ **treuzaminañ**, **treuzaminadur** g. Dazgwered kimiek, anezhañ erlec'hiañ ur stroll amin eus un α-amindrenkenn ouzh soaz keton un α-trenkenn getonek, gant un dasperzhiadur pouezus e kennevid ar proteinoù.

transcobalamine ◇ **transcobalamin** ◇ **transkobalamin** g. Anvad rumm mukoproteinoù gwadveizel diseurt (α₁ ha β-globulin) o festañ hag o tezougen ar vitamin B₁₂ (kianokobalamin).

transcortine ◇ **transcortin** ◇ **transkortin** g. Anvet ivez CBG diwar ar Sz. *Corticosteroid-Binding Globulin*, α-globulin enaozet en avu, krafus kenan ouzh ar c'hortizol hag o lenañ outañ hag e zezougen er gwad, ha dre se o hepkoriñ ma ve dispennet en avu, ma tremenf e esaou ezwazhiedel ha ma ve silet er bloueigoù.

transcriptase ◇ **transcriptase** ◇ **transkriptaz** g. RNA-polimeraz DNArankus, enzim o treluslañ enaoz an RNA diwar ribonukleozidoù trifosfat hag oc'h arverañ an DNA evel pleuskenn. — *transkriptaz gindro* (Gl. *t. inverse ou reverse*, Sz. *reverse t.*) : DNA-polimeraz RNArankus, enzim piaouel viruzoù 'zo (kerentiad ar *Retroviridae*) o ren an treuzskriavañ DNA diwar ur bleuskenn RNA, o kevaraezañ viruz an HAZA ha viruzoù kankreiat 'zo gougevaniñ ouzh genom ar gellig danvevat. Arveret e vez en hilouriezh vakteriel da zazen DNA (diwar RNA ar polipeptid dibabet) evit kalvezerezhioù kloniñ.

transcription ◇ **transcription** ◇ **treuzskriavañ** Enoaz RNA kannad (pe RNA treuzdoug pe RNA ribozomek) diwar bleuskenn an DNA klokaat, gant an RNA-polimeraz.

transduction ◇ **transduction** ◇ **1 treuzeñ** bn. **treuzto-** **2 treuzrezhiañ** **3 treuzren** bn. **treuzre-** 1 Treuzkas stlenn hilel eus ur bakter d'unan all dre hanterezh ur bakteriofag. 2 Treuzfurmadr, e par ur fraouva, eus un arhent fizikel e rezh nervlanv. 3 Treuzkas un arhent o tont eus ul lenant, ur buzer koc'hennel o vezañ bet fraouaet gantañ, etrezek an dewerc'herioù enkelligel, war-benn broudañ an erwez kelligel azas. E seurt argerzh e tasperzh ar proteinoù G hag an adenilat-kiklaz.

transfection ◇ **transfection** ◇ **treutzizhañ** Enteñ kalvezadel un tammad trenkenn nukleek (DNA pe RNA) en ur gellig estren, dre arverañ araezadoù all estreget an tredizhañ viruzel, evel an hentennoù kimiek, bevoniel pe fizikel.

transférase ◇ **transferase** ◇ **transferaz** g. Enzim o treluskañ treuzdoug ur soaz kimiek eus ur c'horf (roer) d'unan all (roadour) : soaz trenkenn (transkilaz), soaz aldehid (transaldolaz), soaz ketonek (transaketolaz), h.a. Da skouer : ar c'hreatinkinaz, an aminotransferazoù (pe transaminazoù).

transferrine ◇ **transferrin** ◇ **transferrin** g. Protein (β -globulin) eus plasma ar gwad o lenañ an houarn hag ouzh e zezougen betek mel an eskern. Er stad vonan ez eo an transferrin peurvec'hiet evit an drederenn eus he lenusted. Ar c'heñver houarn gwad-veizel / lenusted hollel a vez izelaet en amwadoù olhouarnel hag uhelaet er gwadloezioù henek, en amwad Biermer hag en hemokromatozioù pergen. — **transferrin divigat en hidrat karbon** (Gl. *transferrine déficiente en hydrate de carbone* Sz. *carbohydrate deficient transferrin, CDT*) : hollad tri c'hediad keitdelun eus an transferrin andinoadus er gwad dre RIA (hentenn skinhangaeel) pe EIA (hentenn hangaeenzimatek) hag a gresk ar gwadvec'h anezho ent heverk e degouezh bevezadur alkoool etilek reñverek ha henek (muioc'h eget 60-80 g alkoool dre zeiz e-pad 8 deiz da nebeutañ). Ur merker spesadel ha kizidik kenan eus an alkoolegezh henek eo, er c'hontrol eus ar gamma-glutamyl-transferaz hag eus ec'honad keitat an hemati.

transfert ◇ **transference** ◇ **1 treuzdoug** g. **2 treuzdougen**, **treuzteññ**, **treuzkediñ** 1 Er gur vredelfennañ, argerzh ma 'z a trivliadoù karantez pe c'haleniezh en doa ur gouzrec'h en e vugeliezh en un doare enklataet e-keñver un den all (e gerent pe e re nes ar peurliesañ) etrezek ar bredelfenner. 2 Ebarzhadur hanloadoù hilel e genom pe e kromozom kellig ur bakteri (roadour) diwar un tammad DNA o tont eus ur gellig all (roer). An tammad DNA a c'hell enteñ war-eeun (treuzfurmadur), bezañ treuzkaset gant ur plasmid (keveiladur) pe gant ur bakteriofag (treuztoadur).

transfuseur-transfusé : **syndrome** ~ ◇ **twin-to-twin transfusion syndrome** ◇ **azoniad** g. **an treuzskuilh etrekrouellel** Ne sell an azoniad nemet ouzh ar brazezedoù gevellek, ma rann ar c'hrouelled an un torzhienn, evit 15 % ar brazezedoù unkorion daouamñion. An anaer-se a zevoud un digempouez e kas ar gwad etre an div grouell. Unan eus an daou c'hevell — ar roer, an treuzskuilher — a leia kas e wad, en evez da zec'han amwadoù pe un dilerc'h kreskiñ. Ar gevell all — ar roadour, an treuzskuilhadour — a vuia kas e wad, pezh zo en evez da zec'han kudennoù kalongwazhiedel. Tu zo da zereizhañ ar blegenn-se dre wezhiañ gant al laser war an amred krouell-torzhienn, pe / ha dre zelankañ ar gwilioud kent termen (dre kezarian alies).

transfusion ◇ **blood transfusion** ◇ **treuzskuilhañ** Ensinklañ engwazhiennel eus gwad kempadus, fresk pe vir ha, dre astenn ster, eus ur gedrann a 'r gwad (da skouer ar c'helligoù ruz, ar pladanoù, al leukokit) pe eus un erlec'hiad (sl. *autotransfusion* hag *exsanguino-transfusion*). — **treuzskuilhañ enmelel** : kalvezder nemedennek a c'hoarvez a ensinklañ ar gwad e mel un askorn (klerenn, skin).

NOTENN : Anat eo e vez graet ivez gant an deveradoù *treuzskuilhad*, *treuzskuilhadenn*, *treuzskuilhadur*, *treuzskuilherezh*.

transfusionnel ◇ **transfusional** ◇ **treuzskuilhañ**, **treuzskuilhadel** aa. A-zivout an treuzskuilhañ.

transgenèse ◇ **transgenesis** ◇ **treuzhilañ** Enteñ DNA estren en ur gellig, eleze treuzkediñ gen ar gellig roer d'ar gellig roadour ha daskemmañ ar glad hilel anezhi, e gerioù all treuzkediñ hil ar roer d'ar roadour, a se treuzhilañ.

transgénique ◇ **transgenic** ◇ **1 treuzhilel** aa. **2 treuzhiladel** aa. **3 treuzhilek** aa. 1 A-zivout ar c'helligoù treuzhilet. 2 A-zivout an treuzhilañ 3 Perzh ur gellig roadour bet daskemmet an hil anezhi dre an treuzhiladur.

transillumination ◇ **transillumination** ◇ **treuzgoulaouiñ** Goulaouiñ ur gavenn dre dreuzwelusted (kevioù lez-fri, klidennoù, gwezioù, bizied, h.a.), ar gouzrec'h o vezañ en ur pezh teñval.

transit ◇ **transit** ◇ **trehentiñ** Tremen ar boued dre ar forzhioù koazhañ. Graet e vez ivez gant an deveradoù *trehent*, *trehentadur*. — **trehentadur baritek** (Gl. *transit baryte* Sz. *Barium X-Ray Contrast*) : skinimbourc'h ar ganol vezhur goude bezañ euvret un aozad dargemm diwar sulfat barium. — **proud trehentiñ ar vitamin B₁₂ tiellet** (Gl. *épreuve ou test du transit de la vitamine B₁₂ marquée* Sz. *radioactive vitamine B₁₂ uptake test*) : savelañ ar skinoberiegezh e par an avu ur sizhunezh war-lerc'h euvridigezh B₁₂ tiellet gant kobalt skinoberiek. Gant ar gouzrec'h bonan e vez kontet ouzhpenn 1000 skog/min. E degouezh amwad Biermer e leia skinoberiegezh an avu, o vezañ ma n'eo ket suget ar vitamin B₁₂ dre berzh ezvezañs ar barenn enien, hag izeloc'h eo neuze niver ar skogoù eget 200 ; hogen dont a ra da vezañ reol en-dro, mar azdoder ar barenn enien ouzh ar vitamin B₁₂.

translocation ◇ **translocation** ◇ **treuzloañ** En hiloniezh, gouskoevad kromozomel diwar eskemm un hanrann gromozom pe ur c'hromozom klok gant ur re gromozomou all. Emañ an ezreolder-se en evez da vezañ kiriek da anaezioù dre c'houiskoevad kromozomel : trizomiezh 21, leukemiezh vieloidel henek, h.a. — **treuloadur Robertson** : amparadur ur c'hromozom unel metakentrek dre gempegañ div vrec'h hir an daou gromozom akrokentrek, ar c'hromozom diwar gempegañ an div vrec'h verr o vezañ kollet buan.

transmembranaire ◇ **transmembrane** ◇ **treuzkoc'hennel** aa. A-zivout an tremen a-dreuz da goc'henn ur gellig.

transmethylation ◇ **transmethylation** ◇ **treuzvetilañ** Dazgwered kimiek, anezhañ treuzdoug ar bonad metil (CH₃) eus ur c'hediad d'unan all.

transmural ◇ **transmural** ◇ **treuzspeuriat** aa. A-zivout un anaf eus ar c'haheer kalon loet en ec'honenn anezhañ, eus an enkalonenn d'an amgalonenn.

transpéritonéal ◇ **transperitoneal** ◇ **treuzampelennel** aa. A-dreuz d'an ampeleñn, a-zivout an doare da dizhout organoù don 'zo eus ar c'hof (lounezhi, ilgreiz) dre un torenbenañ.

transpiration ◇ **transpiration** ◇ **c'hweziñ** Borc'hañ c'hwezh.

transplantation¹ ◇ **transplantation, graft** ◇ **treuzplantañ** Imboudañ un organ eus un hinienn ouzh unan all, gant assav ar gendalc'hegezh wazhiedel. Merzhomp e tenn da steuziañ ar c'hemm a lakaed etre *imboudañ* ha *treuzplantañ*, eleze enezañ un organ a-bezh erlamet diouzh un den all. — **treuzplantañ unspesadien, unspesadimboud** (Gl. *t. allogénique* Sz. *allogenic graft*) : arverañ un imboud a un spesad (unspesadimboud) hag a c'henezh antigenel kevarall. — **treuzplantañ unanien, unanimboudañ** (Gl. *transplantation autologue* Sz. *autologous graft*) : an treuzplant a zeu eus ar bevedeg e unan. — **treuzplantañ allspesadien** (Gl. *t. hétérologue* ou *xénogénique* Sz. *xenograft*) : an treuzplant a zeu eus ur spesad kevarall. — **treuzplantañ unhilien, unhilimboud** (Gl. *t. isologue* ou *isogénique* Sz. *isologous graft*) : arverañ un imboud hilunglad, erlamet diouzh ur gevell unviel, da skouer.

transplantation² ◇ **muscular transplantation** ◇ **treuzlenañ** Kemmañ lec'h enlenañ ur stirenn, ur gigenn, amkanet da barraat ouzh un divigad loc'hadel.

transpleural ◇ **transpleural** ◇ **treuzkrezennel aa., treuz-krezoù aa.** A-dreuz d'ar c'hrezoù, a-zivout un hentenn arveret da dizhout organoù 'zo e kavenn ar brusik pe er c'hof.

transporteur d'hydrogène ◇ **hydrogen carrier** ◇ **dezouger g. -ioù hidrogen** Danvezenn en araez da dremen aes eus ar stad oksidet d'ar stad direet, hag ar gin. Roll seurt danvezenn, a bouez en analañ kelligel, zo degerc'hañ an hidrogen dilaosket hag enniñvet gant an *dehidrazoù*, ha goude d'e zaskoriñ tamm ha tamm, dezhañ da gediañ gant an oksigen lenet gant ar *kitokrom* ha, dre se, danzen ur gremm arveradus gant ar gellig.

transporteur mécanique ◇ **mechanical vector** ◇ **dezouger g. -ioù treloc'hel** Danvevad hanterour o treuzkas ur pore dre e loc'h hepken, hep ma tedrofe ar garvevion arvevat o trigañ en e vevedeg (a-ragenep da *trezouger*).

transports : **mal des ~** ◇ **motion sickness** ◇ **teadell b., droug g. an dezougen** (sl. *cinépathie, cinétose, mal des transports*).

transposition artérielle ou des gros vaisseaux ◇ **transposition of the great vessels** ◇ **kammload(ur) g. an talmerennoù, kammload(ur) ar gwazhied bras** Kammneuziad wazhiedel ganedigel, an aortenn o tinodiñ eus ar c'hofig dehou ha kef ar skevent eus ar c'hofig kleiz, kevredet gant ur c'hehentad etre-kentezoù, etre-kofigoù pe gant un dreistpad eus ar san dalmerel. Ent klinikel ez erzerc'h dre ur c'hleñved glas grevus, marvus ent emdarzh e-doug an daou vloavezh kentañ eus an hoali dre wadisvec'h oksigen pe dre falladur ar galon. Azoniadoù Taussig-Bing ha Beuren zo seurtadoù a gammload darnel an talmerennoù. *Dereizhet* eo ar c'hammload (disklot daouek), pa vez, daoust da drevnadur ezreol ar funell wazhiedel, porzhet ar c'hef skevent gant ar c'hofig gwazhiennel (a zo al luniadur diabarzh anezhañ hini ar c'hofig kleiz, kehent gant ar c'hentez dehou dre un igorenn dezhi un trapig daouvroudek) hag an aortenn gant ar c'hofig talmerel (dezhañ ul luniadur diabarzh evel ar c'hofig dehou, e kehent gant ar c'hentez kleiz dre un igorenn dezhi un trapig tribroudek). Reol e vez neuze arc'hwel ar galon. Lavaret e vez ez eo *dereizhet* ar c'hammload, pa vez lakaet an trevnadur amañ diaraok da vezañ diglok ent arc'hwelel gant kammneuziadoù kalon kevredet, dulaseiat pergen.

transsacculaire ◇ **1 treuzsac'hel aa. 2 treuzsac'hanel aa.** 1 Loet e-barzh ur sac'h (darvollel, h.a.) || 2 A-dreuz sac'hanoù.

transsexualisme ◇ **transsexualism** ◇ **treuzreviadezh b.** Emhevelebiñ ouzh ar rev all, o vezañ kendrec'hed da vezañ perzhizat ennañ, gant ar c'hoant kreñv ha mac'hennek da gemmañ a stad revel, a-fet neuziadur zoken.

transsudat ◇ **transudate** ◇ **treuznaouezenn b.** Liñvenn vevedel proteinisvec'hiek, o strilhañ e par ur c'horreenn anfoek (kroc'hen, glaouergenn, levgenn) diouzh savelennoù treloc'hel hepken. Un termen nes zo *trenouezenn*, arveret e degouezh un naouezenn e-dalc'h un argerzh foel (sl. *exsudat*).

transsudation ◇ **transudation** ◇ **treuznaouezñ, treuznaouez g.** Tremenn gwadveiz pe liñvennoù bevedel all a-dreuz d'ur glaouergenn, d'ul levgenn pe d'ur gwriad, hervez savelennoù ar velloc'honiezh hepmuiken hag e par gorreannoù anfoek. A-wechoù e c'haller stadañ un treuznaouez ivez a-geñver gant anadennoù grennel.

transsynaptique ◇ **transsynaptic** ◇ **treuzsinapsel aa.** A-dreuz d'ur sinaps.

transthyrétine ◇ **transthyretin** ◇ **transtiretin g.** α-globulin bevenaozet en avu. Lenañ ha dezougen a ra ar vitamin A hag an tiroksin a-wechoù. Ar gwadvec'h transtiretin reol zo er gavael 0,25-0,45 g/L.

transvaterien ◇ **transvaterian** ◇ **treuzvaterel aa.** A-dreuz d'ar gloestr avu-ilgrest.

trapèze ◇ **1 trapezium bone 2 trapezius muscle** ◇ **1 tristurieg g. 2 kigenn b. dristuriek** 1 Askorn eil renkenmad eskern an arzorn. 2 Kigenn rannbarzh a-gein ar gouzoug hag ar c'hef, gorreer ha nesaer ar skoaz, nervaouet gant an adnervenn.

trapèze : **syndrome du ~** ◇ **azoniad g. ar gigenn dristuriek** Laur en askil diwar argrezañ a-drastenn ar gigenn dristuriek hag ar c'higennoù nes, diwar ur c'hammemstumm eus al livenn gein (rakwar gouzoug-kein) gant gouzrec'hioù a labour o fenn stouet war raok.

trappage ou **trapping** ◇ **air trapping** ◇ **trapediñ** Anadenn o c'hoarvezout a azderc'hel aer enanalet en un tiriad bronkezskevent kleñvedel, e-doug an ec'hanañ. Arsellet e vez en emfizem skevent pergen, diwar steviadur ar bronkez ha dardenn reñverek ar skevent; an disoc'h zo ur muiadur bras eus an ec'honad dilerc'h.

Traquair : **syndrome de la jonction de ~** ◇ **Traquair's junctional scotoma** ◇ **azoniad g. glin ar gweltre, azoniad Traquair** Kevredet ur skotom kreiz loet diouzh tu an anaf hag un divigad trobarzhel a-ividiq a-eiltu, naouus d'un anaf e glin ar gweltre, lec'h ma kroazigell ar gwiannoù gwled.

Traube : double ton de ~ ◇ **Traube's sign** ◇ **daoudon** g. **Traube**, **anadenn** b. **Traube** Daoudon a glever o selaouennañ talmerenn ar vorzhed, e tric'hogn ar vorzhed, o pouezañ skañv kenan war ar stetoskop. Un arouez nemedennek a skorted aortek eo.

trauma, **traumatisme** ◇ **trauma** ◇ **daraez** g. Nep keuziad o tiraez ar c'horf pe ar bred sellet en e amveziadoù ha, war un dro, en e heuliadoù er gouziviad. E Gl. e lakaer kemm etre *trauma* ha *traumatisme*, petra bennak ma arverer an daou evel kenster peurliesañ, hag a-zivout bred koulz hag a-zivout korf. E Br. e c'haller ober gant *daraezañ* hag an deveradoù, ar bonad *daraez* o verkañ an anaf lec'hel devoudet gant ur feulster diavaez, koulz hag an dianlenadoù lec'hiek ha hollek anezhañ.

traumatologie ◇ **traumatology** ◇ **daraezouriezh** b. Rann ar vezekniezh o plediñ gant an daraezioù (surjianerezh trummat, darvoudoù treizhid, darvoudoù labour, h.a.).

traumatopnée ◇ **traumatopnea** ◇ **daraezhad** g. Enteñ hag ezteñ aer, trouzus ar peurliesañ, dre igorenn ur gouli er brusk, o kehentaat ar grezenn gant an aer diavaez (bruskaezhad).

travail ◇ **labour**, **work** ◇ **gwentloù** l., **labour** g. ar **gwilioud** Hollad an anadennoù bevedel laurus oc'h amparañ an daou lankad kentañ a r gwilioud : — 1° frankadur gouzoug ar grozh ; — 2° ezvoutad ar grouell. An trede lankad zo ezvoutad an adparzhioù, an dorzhienn, al liennoù.

travail ventilatoire ◇ **work of breathing** ◇ **labour** g. ar **gwentañ** Gremm trelochel pourchaset gant ar c'higennadur gwentañ da souriñ war harzerezh ar benvegadur brusk-skevent ouzh kas an aer. Par eo da liesad ar gwask enbruskel dre argemmadou keñverek ec'honad an aer endalc'het er skevent hag er forzhioù anañ : $W = P \times V$ dewerzhet e joule (J).

travail ventriculaire ◇ **ventricular work** ◇ **labour** g. **kofigel** Liesad gwask keitat (e mm Hg) an aortenn (evit ar c'hofig kleiz) pe kef ar skaveant (evit ar c'hofig dehou) dre ec'hongas ar galon (e L/min) ha dre an arstalenn 0, 1332. Ar gwerzhadoù reol zo 75 J dre vunud evit ar c'hofig kleiz ha 10 evit an hini dehou.

travestisme ou **transvestisme** ◇ **transvestism** ◇ **treuzwiskadezh** b. A-berzh un heñvelreviad pe un treuzreviad, degemer boazioù ar rev all, a-fet dilhad ha kedvuhez (sl. *éonisme*).

Treitz : **hernie de** ~ ◇ **Treitz's hernia** ◇ **aveleñ** b. **Treitz** Avelenn ur c'hilbleg pervez e toull an danter, en ervez da zevoudañ un antreizh dre skoulmadur diabarzh.

Trélat : **fracture de** ~ ◇ **Trélat's fracture** ◇ **torr** g. **Trélat** Seurtad torr unskodennel an askorn morzhed.

Trématodes ◇ **Trematoda** ◇ **Trematod** s. Urzhad preñved eus kevrennad ar Plathelminth, enni an distom hag ar skistozom.

tremblante du mouton ◇ **scrapie** ◇ **krenion** b. an **deñved** (sl. *scrapie*).

tremblement ◇ **tremor** ◇ **kren** g., **krenerezh** g., **krenad** g., **krenadenn** b. Kefroù andiarvenn ar c'horf a-bezh pe a-zarn, dre luskelladoù bihan herrek, kembezus ar peurliesañ gant ur fiñvren diarvenn, un tammig nebeutoc'h resis. Ar c'hrenerezh a c'hell erzerc'hañ er paouez (*kren diasavel*, Sz. *rest tremor*, a vez arsellet e kleñved Parkinson); a-geñver gant ur fiñv (*kren fiñvel*), dreist holl mard eo lusket evit ur pal savelet (*kren diarvenn*, Sz. *action tremor*, ar skleroz strewek). Erziwezh e c'hell bezañ ur *c'hren loadurel* (Sz. *postural tremor*) oc'h anaññ hepen pa vez dalc'het ul loadur, hennadek ha hêrezhel.

trémogène ◇ ◇ **kreneiat** aa. O tevoudañ ar c'hrenerezh.

Trendelenburg ou **Trendelenburg-Brodie** : **manœuvre**, **procédé** ou **signe de** ~ ◇ **Trendelenburg's test** ◇ **hentenn** b. pe **araezad** g. pe **arouez** b. **Trendelenburg** Prouad amkanet da lakaat war wel ar skorted sac'helle en teuc'helloù bas ar c'har. Goude bezañ goullonderet ar wazhienn spis teuc'hellek, dre uhelaat ar c'har, e lakaer ar biz yod war zifourk ar wazhienn hag e lavarer d'ar c'hlañvour da sevel en e sav : ar wazhienn spis a chom goullou ; mar paouezer a bouezañ gant ar biz, a-daol-trumm hag eus krec'h da draoñ, an duilh teuc'hellek a-bezh a emleugn en un taol.

Trendelenburg : **opération de** ~ ◇ **Trendelenburg's operation** ◇ **oberatadenn** b. **Trendelenburg** Digeriñ kef ar skevent hag eztennañ anezhañ ar c'haouledennoù ouzh e steviañ, en degouezhioù a enfroù skevent o lakaat ar vuhez en argoll diouzhtu.

Trendelenburg : **position de** ~ ◇ **Trendelenburg's position** ◇ **loadur** g. **Trendelenburg** Emlakadur ma emañ al lestr uheloc'h eget an divskoaz, ar c'hlañvour o vezañ en e c'hourvez war e gein.

Trendelenburg : **signes de** ~ ◇ **Trendelenburg's signs** ◇ **arouezioù** l. (b.) **Trendelenburg** 1 sl. *Trendelenburg* : *manœuvre de* ~. 2 Arouez a zisvellad ganedigel al lez : e-doug ar c'herzhed, da vare an emharpañ war an ezel disvellet, e tislec'h ar gouzrec'h e zivskoaz etrezek an tu klañv, alese ur "c'hleññ a r skoaz" naouus. 3 Arouez a zisvellad ganedigel a l lez stabilaet : war c'harig kamm war an tu klañv ez arsellet ur stou eus al lestr, izelaet diouzh an tu yac'h, tra ma chom ar c'hef a-blom ha linenn an divskoaz a-zremm. 4 Ar gouzrec'h o vezañ en e sav war ur c'har, al lestr a sav ent reol a-eiltu. Mar diskenn ez eo an arouez-se un azon eus un dinerzhded eus kigenenn genn ar peñs.

trépan ◇ **trepine** ◇ **trepan** g. Ardivink surjanel e stumm un talar, amkanet da doullañ an eskern, re ar c'hloppenn ent dibarek.

trépanation ◇ **trepining** ◇ **trepanañ** Gwezhiadenn surjanel, anezhi gwezhiañ un igorenn en un askorn, unan eus ar c'hloppenn pergen, war-benn karzhañ ur gwatoñv war-dev.

trépano-ponction ◇ ◇ **trepanañ-ezwanañ** Ezwanañ kambr kostezel an empenn, war-lerc'h un trepanañ.

trépiéd méningitique ◇ ◇ **triazon** g. ar **pilhonfo** Teskad tri azon pennañ an azoniad pilhonel : kloppennad, c'hweladoù, goustivadur (sl. *méningé* : *syndrome* ~).

Treponema ◇ **Treponema** ◇ **Treponema** Genad bakteri eus kerentiad ar *Spirochetaceae*, garveion etre 6 ha 14 µm hed, dezho ur c'horf troellennek, moan kenan, kranennek, gant 10 tro bun reoliek, hag a-wechoù ouzh ar pennoù begek un astenn moan. — **Trepona pallidum** : gwezher ar sifiliz. — **Trepona pertenuis** : gwezher ar pian. — **Trepona cuniculi** : gwezher spiroketoz gwenerel ar c'honikl (sl. *tréponémose*).

tréponème ◇ **treponema** ◇ **treponem** s. Bakteri eus ar genad *Treponema*.

tréponémicide ◇ **treponemicidal** ◇ **treponemlazher** aa. & g. En araez da zistrujañ an treponem.

tréponémose ou **tréponématose** ◇ **treponematosi** ◇ **treponematoz** g. Anv genadel ar c'hleñvedoù devoudet gant an treponem, bejel, sifiliz, pian, pinta.

triade ◇ **triad** ◇ **triad** g. Teskad teir elfenn, teir arouez, tri azon, h.a.

triaxial : **système ~ de référence** ◇ **triaxial reference system** ◇ **reizhiad b. daveiñ tri ahel** Goulun savet dre zilec'hiañ, hep lakaat da argemmañ an durc'hadur anezho, tri zu tric'horn Einthoven, e doare ma vent kenskej en un poent. An tri ahel-se a zerc'houez an tri amdregad reolat, o tezvonnañ 6 gennad ma c'haller bannañ ar sturiadell voutin o terc'houezañ tredanahel ar galon.

tribadisme ◇ **tribadism** ◇ **tribadiezh** b. Heñvelster *lesbianezh*, *safegezh*, heñvelreviadezh venevel.

tribo-électricité ◇ **triboelectricity** ◇ **rimdredan** g. Tredan diorreet dre rimiañ.

tribologie ◇ **tribology** ◇ **rimiouriezh** b. Diskiblezh o plediñ gant ar rimiañ hag an uzañ, en arzkleñvedouriezh.

TRIC : **agents ~** ◇ **TRIC agents** ◇ **gwezherioù** l. (g.) **TRIC** Garveion etre ar viruz hag ar bakteri eus ar genad *Chlamydia*, gwezherioù an trakom, ar c'hevresaefo hag ar c'hantroazhfo ebarzhennek.

tricéphale ◇ **tricephalus** ◇ **trikefal** g. Stroll euzheion triat dezho tri fenn dispartiet war ur c'horf hepken.

triceps ◇ **triceps** ◇ **trifennek** aa. A-zivout ur gigenn oc'h enlennañ e-par unan eus an eizhaennoù anezhi dre tri fenn disparti, da skouer *kigenn drifennek ar vrec'h*, *kigenn drifennek ar c'har*.

trichesthésie ou **trichoesthésie** ◇ **trichaesthesia** ◇ **bleveraeziñ** Kizidigezh ar blev ouzh ar stekiñ pe ouzh an distummañ.

trichiasis ◇ **trichiasis** ◇ **trikiiaziz** g. Drektouadur ganedigel pe arzeuat ar malgud war-du ar voull lagad, hep ma kemerfe perzh ar valvenn en disneuziadur-se. Hegadur pad kevresaefo ar voull hag ar gornsaefo, a-zianlen, zo un arbenn a gornsaefo hag a entropion. — Pa vez ar malgud drektouet en un pe lies rezad valgud dreistniver e reer anv a *falangoz*.

trichine ◇ **trichina** ◇ **trikin** s. Anv boutin ur genad preñved (*Trichinella*), arvevaded eus urzhad an *Nematod*, a gaver o furn oadour e pervez ar moc'h (a-se an anv kaozeek *preñv gourc'he*). Ar rizheloù, ur wech ganet, a dreuz speur ar pervez ha dehentañ dre ar bevedeg evit chom a-sav er c'higennoù ha, dreist holl, er gelc'hspeurren, er c'higennoù etre-kostoù, e re al lagad, h.a. Eno ez enkistont, e tremenont er stad larvel hag e vanont en enkelvezh. — Kavet e vezont ivez gant an den, ma tevoudont an *trikinoz*.

Trichinella spiralis ◇ **Trichinella spiralis** ◇ **Trichinella spiralis** Spesad eus ar genad *Trichinella*.

trichinose ◇ **trichinosis** ◇ **trikinoz** g. Kleñved devoudet gant euvridigezh kig hoc'h trikin. O tarvezout ent darzeuziadek, dibaot kaer eo du-mañ hag er broioù ma vez poazhet ar c'hig hoc'h hir a-walc'h. A-wechoù ez eo bet devoudet gant euvridigezh kig hoc'h-gouez pe marc'h (ar c'hig-mañ debret kriz). Erzerc'hañ a ra da gentañ dre strafuilhoù koazhadel, ha goude dre un derzhienn uhel, un asikted, klopennadoù, glazioù, dargrezadoù kigennel, hag erziwezh dre ur gouliñv tro-bod, oc'h aloubiñ a-wechoù an dremm a-bezh, an izili hag ar c'hef. Imbourc'h ar gwad a ziskouez ur muiadur bras eus feur an eozinofil, ur muiadur eus feur an enzimoù kigennel, hag erziwezh un erwezh gwadveizel spesadel. Gwechall e veze marvus an trikinos.

trichobézoard ◇ **trichobezoar** ◇ **trikobezoar** g. Korf estren kavet e stomok pe e daouzegenn an den, graet gant blev.

trichocéphale ◇ **trichocephalus** ◇ **trikokefal** g. Anv boutin ur genad preñved (*Trichuris trichiura*) arvevat eus urzhad an *Nematod*, gant ur parzh araok moan kenan evel un neudenn, o trigañ en o stad oadour e sac'henn an den.

trichocéphalose ◇ **trichocephalosis** ◇ **trikokefaloz** g. Kleñved devoudet gant an trikokefal, o c'hoarvezout eus strafuilhoù pervezel diseurt, kevret gant elwenn, amwad a-wechoù. Soliañ a reer an deznaou war zinoadur ar vioù da-geñver imbourc'h arvevadoniel an oulennoù.

trichoclasie ◇ **trichoclasia** ◇ **trikoklazierh** b. Torr ar blev en arbenn eus ar vreskted ezreol anezho.

trichoclastie ◇ **trichoclasty** ◇ **trikoklastierh** b. Skruz a ra d'ar gouzviad difrapañ pe deriñ ar malgud, an abrantoù, blev ar barv pe ar briger.

tricho-épithéliome papuleux multiple ◇ ◇ **trikoepiteliom** g. **krugennek liesel** Seurtad adenom soavel kemparzhak a 'n dremm.

trichogénique ◇ **trichogenous** ◇ **trikogenek** aa. O tevoudañ kresk ar blev.

trichogramme ◇ **trichogram** ◇ **blevestrada** g. Disoc'h eus studi gwizioù ar blev, o kevaraezañ savelañ kenfeur ar blev a-geñver gant o stad emdreiñ : 1° ar *stad anagen*, kreskvezh e-pad daou vloavezh, ent reol 84 % eus ar blev ; 2° ar *stad katagen*, 20 devezh lankad arsaviñ, 1 % ; 3° ar *stad paouez* pe *stad telogen*, 4 mizvezh, 15 %.

trichomalacie ◇ ◇ **blevlodad** g. Kleñved eus ar vrigenn naouus, gant ar bugel, dre un diwaoutad e plakennoù dihevonn, kilpennel pe gignel, warno an nebeut blev ledan kenan ha blot kenan.

trichomonacide ◇ **trichomonacidal** ◇ **trikomnazlazher** aa. & g. En araez da lazhañ an trikomonaz, da skouer an nitro-5-imidazolou.

Trichomonas ◇ **Trichomonas** ◇ **Trichomonas** Genad protozoid perheñvel, dezho ur c'horf antroellennek, 3 pe 5 skourjezig araok hag ul lienenn neuennus, oc'h arvefañ er c'havennoù naturel. Menegomp *Trichomonas vaginalis* (arvevidi ar forzhioù troazhañ hag ar glaourgenn ganadel) ha *Trichomonas intestinalis* (arvevidi glaourgenn ar pervez).

trichomonase ◇ **trichomonasis** ◇ **trikomnaz** g. Erialerezh gant protozoid eus ar genad *Trichomonas*. Ar furn baotañ zo an trikomonaz troazhañ-geneel, diwar *Trichomonas vaginalis*, oc'h erzerc'hañ gant ar venev dre ur gouinfo ha gant ar gourev dre ur c'hantroazhfo diheverzh; dibaot kaer eo du-mañ an trikomonaz pervezel (diwar *Trichomonas intestinalis*).

trichomycose ◇ **trichomycosis** ◇ **trikomikoz** g. Kleñved arvevadel eus garennoù ar blev (sl. *pie*dra ha *lépo*thrix).

trichonodosis ◇ **trichonodosis** ◇ **trikonodoziz** g. Aneaz o tarvezout gant gouzrec'hed blev hir, rodellek pe kruged. Ar blev a embun warno o unan, diouto o unan pe da heul ar broustadoù pe ar c'hravadoù. Amparañ a reont skoulmoù a skarill hag a dorr, pa vezont broustet.

trichophobie ◇ **trichophobia** ◇ **1 blevgaz** g. **2 blevarur** g. 1 Erez kleñvedel da stekiñ ouzh gwiadoù 'zo evel ar voulouz, ar seiz, h.a. 2 Amgren enkreuz anglevet gant merc'hed 'zo da goll o c'hened gant re a varblev war o dremm.

trichophytide ◇ **trichophytid** ◇ **trikofitid** g. Erzerc'had kroc'hen a-zalc'h gant an drikofitiez, hep bezañ voas an arvevad en e bar.

trichophytie ◇ **trichophytosis** ◇ **trikofitiez** b. Kleñved devoudet gant dinodadur war c'horre ar c'hroc'hen eus ur foue arvevat a 'r genad *Trichophyton*. Sezet e vez war ar vrigenn ma tec'han an *tagn touzus*, war ar barv ma tevoud ar *sikoziz trikofitek* hag ar *c'herion*, war ar rannbarzhioù blouc'h ma tec'han an *eror kelc'hennek* ha war an ivinoù, tizhet neuze gant an *onikomikoz trikofitek*. — Dav eo dispartiañ diouzh an trikofitiezhoù an *tagn touzus diwar spor bihan Gruby-Sabouraud*, nad eo ket enbeziat er stroll-se; devoudet eo gant ur foue *Sabouraudites (pe Microsporon) audouini*, nad eo ket un trikofiton (sl. *microsporie* ha *tokelau*).

Trichophyton ◇ **Trichophyton** ◇ **Trichophyton** Genad foue arvevat o tiñvañ war ar c'hroc'hen hag e adparzhioù (blev, ivinoù), ma tevoud an trikofitiezhoù diseurt. Gougevret outañ ez eus lies spesad enblevennat pe ezvlevennat.

trichoptilose ◇ **trichoptilosis** ◇ **trikoptiloz** g. Darallad ar briger, naouus dre vlev sec'h pe sec'hoc'h, o skarrañ, pe en o fenn (blev forc'hek), pe en o hed. Seurt displeberadur, devoudet a-wechoù gant arouelioù blev digerreizh, a gaver gant kroc'henadoù diseurt: trikofitiez, soavred sec'h, pe zoken gant poreoù grevus.

tricho-rhino-phalangien : **syndrome** ~ ◇ **tricho-rhino-phalangeal syndrome** ◇ **azoniad** g. **briger-fri-oeñsoù** Kevreted hêrezhel dibaot kammneuziadoù, o c'hoarvezout eus : briger rouez, ur fri e stumm ur berenn, bizied ulmennek ha kenforc'hus. War ar skinluniou e stader un neuz kernennek eus talpennoù an oeñsoù, a adkaver en un nebeut kleñvedoù hêrezhel. An azoniad-se a ve nes da gleñved Thieman; ur surettad akrodysplaziezh eo. Bremañ e lakaer kemm etre ar rizh I, treuzkaet hervez ar mod aotozomek trec'hek, hag ar rizh II, anvet ivez *azoniad Langer-Giedon*, skignek, naouus dre ec'haskornennoù liesel, ha kevreted un dilerc'h bred.

trichorrhexie ◇ **trichorrhexis** ◇ **blevfreg** g. (sl. *cheveux en bambou*, *trichorrhexie invaginée*, *trichorrhexie nouvelle*).

trichorrhexomanie ◇ **trichorrhexomania** ◇ **blevfregvar** g. Skruz a ra d'ar gouziviad terriñ e vlev dre o breviñ etre e ivinoù.

trichose ◇ **trichosis** ◇ **trikoz** g. Anvad genadel kleñvedoù hag ezreolderioù ar blev hag ar briger.

trichosis ◇ **trichosis** ◇ **trikoziz** g. Dinodadur ezreol blev war ur parzh a chom blouc'h ent voas hag ent dibarek war ur glaour-genn, hini ar c'hwezbigell da skouer pe hini ar c'han troazh (kist dermoidel). — **trikoziz tagos an daeroù** (Gl. *t. de la caroncule*) : diorreadur reñverek krakvlev tagos an daeroù.

Trichosporon ◇ **Trichosporon** ◇ **Trichosporon** Genad foue, spesadoù anezho en ervez da vezañ kleñvedus gant an den, pa vez hangaeastalek pergen (sl. *pie*dra, *sida*).

trichothiodystrophie ◇ **trichothiodystrophy** ◇ **trikotiodistrofiezh** b. Kevreted, a orin hilel, un dilerc'h bred hag un neuz hedorr eus blev, a zo rouez, ar briger, enno ur bec'h sulfur izel kenan, oc'h anadiñ bezañ amparet gant rezoù sklaer ha teñval ouzh ar c'horrgresker bleinekaus.

trichotillomanie ◇ **trichotillomania** ◇ **divlevvar** g. Skruz, anezhañ tennañ blev eus ar briger pe eus un rannbarzh all.

trichromasie ◇ **trilivwel** g. Stad un trilivweleg.


trichromate ◇ **trichromatic** ◇ **1 trilivwelek** aa. **2 trilivweleg** g. -eion 1 A-zivout al lagad bonan o verzhout mat tri liv diazez ar skalfad (ruz, gwer, glas – pe mouk evit lod), hag ivez an arlivioù anezho. — **trilivwelek ezreol** (Gl. *t. anormal*) : a-zivout al lagad a zigemm tri liv diazez ar skalfad, gant daskemmadoù evit a sell diverzhout al luc'hskinreadoù keñverel ha marteze al leunvezioù anezho (sl. *protanomalie*, *deutéranomalie*, *dyschromatopsie*, *tritanomalie*). 2 Gouzrec'h an trilivwel.

Trichuris ◇ **Trichuris** ◇ **Trichuris** Genad lenkern (an trikokefal) a zo ar spesad *Trichuris trichiura* oc'h erialañ sac'henn an den, o tevoudañ an trikokefaloz.

tricuspid ◇ **tricuspid** ◇ **tribroudek** aa. A-zivout ur gwask, outañ tri broud. — *an trapig tribroudek* a gehenta ar c'hentez hag ar c'hofig dehou.

tricuspidite ◇ **tribroudf** g. Tanijern an trapig tribroudek hag ar sac'helloù anezhañ.

- tridermique** ◇ **tridermic** ◇ **teirfeilhennel** aa. A-zave teir feilhenn ar blastoderm (endoderm, mezoderm, ectoderm).
- trieurs de laine : maladie des** ~ ◇ **anthrax pneumonia** ◇ **kleñved g. an didouezierion c'hloan, skeventfo serkel** Bronkezskeventfo kentael devoudet gant bazhell ar serk (*Bacillus anthracis*) (sl. **charbon, maladie charbonneuse**).
- triglycérïde** ◇ **triglyceride** ◇ **triglikérid** g. Nep ester diwar gengediañ ar glikérol ha tri molekul trenkennoù druz. An triglikéridoù a vez kavet er behin hag er gwadveiz, ar re ziwedhañ dezho daou orin : ezdeuat diwar druzennoù ar boued (bevenaozet en epitelienn ar pervez), endeuat diwar glukoz pergen (bevenaozet en avu). Ereet ouzh proteinoù ar gwad ez amparont ar c'hilomikron (triglikéridoù ezdeuat) hag ar rak-β-lipoproteinoù pe lipomikron (triglikéridoù endeuat).
- triglycérïdémie** ◇ **triglyceridemia** ◇ **gwadvec'h triglikérid, triglikéridwadvec'h** g. Feur an triglikéridoù er gwad, ent reol etre 0,40 hag 1,70 g/L (sl. **glycérïdémie**).
- trigonal** ◇ **trigonal** ◇ **1** ~ **tric'hogn, tric'hognel** aa. **2** ~ **krommenn, krommennel** aa. **1** A-zave d'un tric'hogn (ar c'hwesha, ar c'hwezhihell). **2** A-zave d'ar grommenn.
- trigone** ◇ **trigone** ◇ **1 tric'hogn g. 2 krommenn** g. **1** Luniad tric'hornek, da skouer *tric'hogn ar c'hwezhihell*, kavenn e diabarzh ar c'hwezhihell, gavalet etre igorennoù ar sanioù troazh hag ar c'han troazh. **2** Evit ar grommenn (Lat. *fornix*) zo ul luniad e stumm un hordenn war gwiennoù gwenn lec'hiet dindan ar c'horf karnek.
- trigonite** ◇ **trigonitis** ◇ **tric'hognfo** g. C'hwezhihellfo sezet e tric'hogn ar c'hwezhihell.
- trigonocéphalie** ◇ **trigonocephaly** ◇ **tric'hornbennegezh** b. Kammneuziad ar c'hlopenn naouus dre ur stumm tric'hornek beg araok, gant ur bos tal ha daou vos kitem. An arbenn zo soutadur rakkoulz mellez an tal.
- trigonosomie** ◇ **trigonitis** ◇ **trigonozomiezh** b. Kleñved diwar c'houkoevad kromozomel, naouus dre vezañs tri c'hromozom revel (gonozom) e kelligoù ar soma. Ur furn a drizomiezh eo.
- triïodo-3, 5, 3' thyronine** ◇ **triïodothyronine, T3** ◇ **triïodo-3, 5, 3' tironin g., T3** Unan eus an hormonoù skoedel. N'en kaver er gwadveiz dindan e furn diere nemet a gementad bihan ; rak, daoust ma 'z eo pouezusoc'h ar furn-se eget an tiroksin T4 (nebeut ereet eo T3 ouzh ar proteinoù), tennet eo diouzh ar gwad adal ar furmadur anezhañ hag arveret gant ar gwiadoù. Emañ ar gwadveizvec'h anezhañ er gavael 70-190 ng/100 mL. — **azoniad T3 ha T4 isvec'hiek** (Gl. *syndrome de basses T3 < et T4 Sz. euthyroid sick syndrome*) : leidiar bec'h hollel an T3 kevret pe get gant hini an T4 hollel (an TSH o vezañ reol) stadet e-kerz kleñvedoù anskoedel diseurt grevus kenan (sl. *thyroïdienes : hormones* ~).
- Trillat-Lackman : épreuve de** ~ ◇ **Trillat-Lackman test** ◇ **prouad g. Trillat-Lackman** Arglask un arouez an diretenn kent e gwadennoù ar gliñ, war astenn pe war bleg un tammig.
- triocéphale** ◇ **triocephalus** ◇ **triokéfale** g. Euzheg otokefalek naouus dre an ezvezañs a venvegad genoù, a venvegad fri hag a venvegad lagad. Ar penn ned eo ken nemet ur voñsennig goloet hogos unvan gant kroc'hen.
- trioléine marquée : épreuve de la** ~ ◇ **triolein test** ◇ **prouad g. an triolein tiellet** Prouad o kevaraezañ studiañ koazhadur an druzennoù, anezhañ dezventañ er gwad skinoberiegezh an iod 131 a dalvez da diellañ an triolein euvret gant ar gouziviad. Ur gwadvec'h uhel a erzerc'ha, war un dro, ur c'hoaz-hañ mat gant lipaz an ilgreiz, o tispenn an triolein e trenkenn oleek hag ur sugañ mat anezhi gant ar vouzellenn voan. Ur gwadvec'h izel a zurc'ha an evezh war un diouer lipaz, war ur c'hleñved eus ar vouzellenn voan pe an daou war un dro. Ur prouad gant trenkenn oleek tiellet a gevaraez neuze digemmañ, en arbenn un druzoul, lod an ilgreiz ezvorc'hat ha hini ar vouzellenn voan.
- triphalangie** ◇ **triphalangism** ◇ **trioeñs** g. Kammneuziad ar meud, dezhañ tri oeñs e-lec'h daou.
- triphasique** ◇ **triphasic** ◇ **trilankadek** aa. A-zivout ur bevedeg pe un anadenn o tremen dre dri lankad dispartiet.
- triplégie** ◇ **triplegia** ◇ **triseizi** g. Ledseizi gant seizi un ezel a-eiltu.
- triolet** ◇ **triolet** ◇ **triad** g. En hiloniezh volekulel, unvez teir bazenn kenheuilh er molekul DNA pe RNA, o vonegañ evit un amindrenkenn spesadel.
- triolet XYY** ◇ **azoniad an daou Y, genotip g. XYY** (sl. "*chromosome du crime*", *syndrome du double Y, triplet XYY*).
- triploïde** ◇ **triploid** ◇ **triploidel** aa. A-zivout ur gellig eus ar soma pe un hinienn, enno tri genom (tri lod kromozom).
- triploïdie** ◇ **triploidy** ◇ **triploidiezh** b. Stad ur gellig pe un hinienn driplouid.
- triplopie** ◇ **triplopia** ◇ **triwel** g. Strafiuilh ar gwelad unlagadel, naouus dre verzhout teir skeudenn eus un ergoren.
- triplo-X : syndrome** ~ ◇ **triploX, superfemale syndrome** ◇ **azoniad g. XXX** Kleñved diwar c'houkoevad kromozomel, naouus ent hilel dre vezañs 3 c'hromozom revel X ; ur seurtad trizomiezh eo. Arsellet eo bet gant beneved a neuz bonan pe c'houevanek un disterañ, miziaouek reizh ha frouezhus, laban hogos atav.
- tripode : signe du** ~ ◇ **arouez b. an trifav** Arouez arsellet el louetvelfo araok goulemm : ar c'hlañavour, evit mont en e goazez war e wele, a harp war daou boent a-dreñv e gain gant e zivrec'h.
- triradius** ◇ **triradius** ◇ **triskin** g. Kroc'henrezh e stumm ur steredenn deir brec'h.
- tris-hydroxy-méthyl-amino-méthane (THAM)** ◇ **trishydroxymethyl-aminomethane, THAM** ◇ **trishidroksimetil-aminometan g., THAM** Danvezenn skurzer diounezet ent genaouel pe ent engwazhiennel, arveret e prederiadur an akidozo kennevidel, dre he ferzh lenañ an ion H⁺.



trismus ◇ **trismus** ◇ **genglav g.** Argrezad tantek ar c'higennoù chageller o tevoudañ darserridigezh ar genoù. Azon kentrat ha naouus an tetanoz, arsellet ivez e darvoudoù an dant diwezhat.

trisomie ◇ **trisomy** ◇ **trizomiezh b.** Stad naouus dre vezañ ur c'hromozom dreistniver war ur re gromozomoù. An ezreolled a c'hell angorzhañ ar gonozomoù pe an aotozomoù o tevoudañ ur c'hleñved dre c'housoevad kromozomel. Kiriek eo an drizomiezh 21 da azoniad Down : kevreted, adalek ar c'hanedigezh, ul labanded hag un enebrezh dibarek, hag ivez kammneuziadoù diseurt.

trisyptome de Gougerot ◇ **Gougerot's trisymptomatic disease** ◇ **triazon g. Gougerot** Anaez kroc'hen a natur allergek, naouus dre deir urzh azonoù : — 1° elfennoù eritematus-krugennek etre 2 ha 10 mm treuzkiz, kokardennek ha gloevennek a-wechoù ; — 2° brizhennoù purpurek eus 1 da 5 mm ; — 3° ha ozvennoù kroc'hen, kalet, goloet gant kroc'hen bonan. Dedreñ a ra a-hed ar bloavezhioù dre frapadoù a-gevret gant terzhienn, arzostoù, sourr kalon. Kuñv eo erdeb an anaez, en ervez da vezañ kevredet gant anaezioù diseurt (kleñvedoù reizhiad, poreadoù, pistriadoù, h.a.). Emañ e stern ar gwazhiedfoioù kroc'hen allergek.

tritanomalie ◇ **tritanomaly** ◇ **tritanomaliezh b.** Gwariadenn leiek eus gwel ar glaz (pe ar moug evit aozerion 'zo), glazangwel leiek. Bez' ez eo un trilivvel ganedigel ezreol (sl. *trichromate anormal*).

tritanope ◇ **tritanopic** ◇ **1 glazangwelek aa. 2 glazangweleg g. -eion** 1 A-zivout ul lagad, un den tizhet gant ar glazangwel. 2 Gouziviad glazangwelek.

tritanopie ◇ **tritanopia** ◇ **glazangwel g., tritanopiezh b.** Dic'halloud da verzhout al liv glas (pe al liv mouk evit lod), trede liv diazez ar skalfad (ruz, gwer, glaz pe moug).

trithérapie ◇ **tritherapy** ◇ **triyac'hadur g.** Mezegadur o kevredañ tri gwezher, da skouer en dorzhellegezh, en uswask talmerel, en haza.

tRNA ◇ **tRNA** ◇ **RNA g. treuzdoug, tRNA** RNA treuzdoug.

trocart ◇ **trocar** ◇ **broskan g. -ioù** Garenn vetal kranennek marc'het war un troad, dezhi ur beg tric'hornek lemm, o riklañ e-barzh ur c'horzan, ar broud anezhi o nodiñ er penn. Ur wech sanket ar broskan, e lezer ar c'horzan hepken en treug toulet gant ar c'harenn dre lemel kuit houmañ da reiñ tro d'an diverañ.

trochanter ◇ **trochanter** ◇ **trovaieg g.** An trochanter bras hag an hini bihan zo an daou valed lec'hiet e penn uhelañ an askorn vorzhed. An hini bras zo ur balir pevare'hornek lec'hiet en tu diavaez, enlenva an darn vrasañ eus kigennoù al lez. Evit an hini bihan zo lec'hiet en tu diabarzh, enlenva ar gigenn loan-klun.

trochin ◇ **lesser tuberosity of the humerus** ◇ **torzhell b. vihan** Torzhell lec'hiet e penn uhelañ ar paler, enlenva ar gigenn endan-skoaz.

trochiter ◇ **greater tuberosity of the humerus** ◇ **torzhell b. vras** Torzhell lec'hiet e penn uhelañ ar paler, enlenva ar c'higennoù is- hag us-spernenn, hag ivez ar gigenn ront bihan.

trochléaire ◇ **trochlear** ◇ **˘ar boleenn, a-boleenn aa.** A-zivout ar boleenn. — *nervenn a-boleenn* (Gl. *nerf trochléaire* Sz. *trochlear nerve*) : pevare re nervennoù a-glopenn, nervenn loc'hañ kigenn veskellek uhelañ al lagad.

trochlée ◇ **trochlea** ◇ **poleenn b.** Luniadur korfadurel e stumm ur pole. — *poleenn ar paler* (Gl. *t. humérale* Sz. *t. of the humerus*) : baleg e parzh kreizer penn izelañ ar paler a ampar un doare pole o kenvellañ en ask a-boleenn an helmo.

trochocéphalie ◇ **trochocephalia** ◇ **arrontbennegezh b.** Kammneuziad ar c'hlopenn naouus dre e stumm arront.

Troell-Junet : **syndrome de ~** ◇ **Troell-Junet syndrome** ◇ **azoniad g. Troell-Junet** Hiperostoz kloppennel strewek gant keurvleñchegezh ha skoedusvorc'hegezh, en ervez da gevredañ gant un diabet c'hwec. An arouezioù enborc'hadel-se a erzerc'ha un hiperpituitaregezh vloc'hel kent.

Troiser : **ganglion ou signe de ~** ◇ **Virchow's node, Troisier's sign** ◇ **arouez b. pe gwerblenn b. Troisier** Klom limfel us-trebez kleiz, muiat e ec'honad ent eilvedel d'ur c'hankr eus ar stomok pe ar pervez.

Troisier : **méthode de ~** ◇ **Troisier's method** ◇ **hentenn b. Troisier** Kalvezder kigenañ oc'h arverañ argrezadoù keitvent (pe diasavel), spanaennek hag arreat, ha pebeilañ bep 6 eilenn an argrezadoù hag an diargrezadoù.

trombidiose ◇ **chigger dermatitis** ◇ **trombidioz g.** Dermatoz kuñv, anvet ivez *lepto*, *dermatoz al lun*, devoudet gant flemmadennoù un akar, an *Trombidium* (*gwrec'h Eost* pe *mederig*). Heñvel eo an azonoù da re an hakrez : laurioù, debron, koll ar c'houked, c'hwezigennoù gant roudoù skrabadennoù, hogen hep an irvi evel evit an hakrez. Sezet eo an anafoù e-par ar gouriz, ouzh bevenn uhelañ al loeroù. Reuziañ a ra an trombidioz en Eost ha Gwengolo.

trombone : **mouvement de ~** ◇ **tongue tremor** ◇ **kren g. trombonek an teod** Seurtad kren an teod, evel loc'hadoù rikl-dirikl un trombon, arsellet er seizi hollek.

Trömner : *manœuvre, réflexe* ou *signe de* ~ ◇ **Trömner's sign** ◇ **embreg g., damoug g. pe arouez b. Trömner** Kiziata gant ur biz talbenn palvel penn biz kreiz pe biz yod pleget ar gouzrec'h, an dorn o vezañ palvsavet. Ent reol e telusk plegadur ar bizied. Diwar-bouez an damoug-se ez imbourc'her c'hwec'hvet gwrizienn nervennoù ar gouzoug.

trompe ◇ **tube** ◇ **korzenn b.** Kanol duellennel en arfrank ouzh unan eus he fennoù. — **korzenn ar grozh** (Gl. *t. utérine* ou *t. de Fallope* Sz. *uterine tube*) : pep hini eus an div gorzenn gaherliennek oc'h askouezhañ a-gostez korn ar grozh hag o kabellañ ar vierrez gant o fempilhoù, o kas ar vigellig eus ar vierrez betek kavenn ar grozh. — **korzenn glevedel** (Gl. *t. d'Eustache* ou *t. auditive* Sz. *eustachian tube* or *auditory tube*) : kanol aergaser askormmigornel o kehentaat kavenn an daboulin hag ar fric'hargadenn.

tronc ◇ **trunk** ◇ **kef g. -ioù** 1 Parzh kreiz korf an den, o c'hoarvezout eus ar bruski, ar c'hof hag al lestr, stag outañ an izili hag ar gouzoug. 2 Parzh deroù un nervenn pe ur wazhiedenn (talmerenn, gwazhienn pe gwazhied limf), a-raok skoultrennañ.

tronc basilaire : **syndrome de thrombose du** ~ ◇ **basilar artery thrombosis syndrome** ◇ **azoniad g. tromboz talmerenn an diazpenn** Teskad an direizhoù navel eilvedel da steviadur talmerenn an diazpenn. Liesmod kenan eo an azonoù navel, o kevredañ e feurioù diseurt : koabrennegezh, ustant, nervennoù klopennel 'zo, strafuilhoù lagadel ha struzhel (analadel ha gwrezel). Dedreñ a ra dre frapadoù kenheuilh etrezek ar marv.

tronc cérébral : **syndromes du** ~ ◇ **brain stem syndrome** ◇ **azoniadoù g. kef an empenn** Teskad azoniadoù diwar dizhadur an nervgreizzennoù loet etre ar mel a-livenn hag an empenn (sl. *bulbaire, protubérantiels* ha *pédonculaires* : *syndromes* ~).

tronc pulmonaire ◇ **pulmonary trunk** ◇ **kef ar skevent** Gwazhiedenn wad bras he c'havnez o tont eus kofig dehou ar galon, oc'h emrannañ e div dalmerenn, kleiz ha dehou, a gas ar gwad gwazhiennel d'ar skevent.

tronculaire ◇ **truncal** ◇ **kefel aa.** A-zivout ur c'hef, eus un nervenn pe ur wazhiedenn.

tronculite sous-cutanée ◇ **keffo aa. dangroc'hen** Tanijenn, goulemm pe henek, o tedreñ etrezek ar fibroz, o tizhout elfennoù diseurt un duilh gwazhiednervel dangroc'hen hag ivez ar gwiad kenglenel gouskor anezhañ. Naouiñ a ra dre ur funell argalet laurus ouzh an teuta.

trophallergène ◇ **trophallergen** ◇ **trofallergen aa.** Antigen euvret e par ar ganol verzhur, en araez da zelankañ un erwezhangaeel.

Tropheryma whippelii ◇ **Tropheryma whippelii** ◇ **Tropheryma whippelii** Genad bakteri eus kevrennad an *Aktinomiket*, gwezher kiriek da gleñved Whipple.

trophicité ◇ **trophicity** ◇ **teñvañ, teñvegezh b.** Mezbur ha diorren ul luniad bev.

trophique ◇ **trophic** ◇ **teñvañ, teñvel aa.** A-zivout mezbur ar gwiadoù. — **nervgreizenn deñvañ, nervenn deñvañ** (Gl. *centre t., nerf t.*) : nervgreizenn ha nervenn o tasperzhiañ e mezbur ar gwiadoù, un organ pe ur benvedeg eus ar bevedeg, an anaf anezho o tevoudañ strafuilhoù teñvañ.

trophoblaste ◇ **trophoblast** ◇ **trofoblast g.** Gwiskad kelligoù amrizhellel, trobarzhel, ar blastokist, o festañ ar rizehell ouzh speur ar grozh hag ouzh he magañ. An trofoblast a amparo goude haenad c'horre ar bodennoù torzhienn. — Ar bevsav anezhañ a gevaraez dreist holl rezañ ar rev, ar genrizh, an DNA ha bezañ kleñvedoù hêrezhel 'zo (sl. *amniocentèse, ponction amniotique*).

trophoblastome ◇ **trophoblastoma** ◇ **trofoblastom g.** Yoc'henn yud evodet diouzh an trofoblast.

trophœdème ◇ **trophœdoema** ◇ **trofedem g.** Kleñved henek hêrezhel, naous dre c'houlivnoù rannbarzhel ledek, stirek, sezet en izili traoñ pergen. Devoudet e vez ar peurliesañ gant ur skorted sac'helle limfel ganediged.

trophonévrose ◇ **trophoneurosis** ◇ **trofoneuroz g.** Nep naoued naoued dre strafuilhoù teñvañ na c'haller ket liammañ ouzh un anaf savelet eus an nervreizhiad (sl. *aïnhum, Romberg* : *maladie de* ~).

trophophylaxie ◇ **bouedergostañ** Perzh bouedoù 'zo da wareziñ ar bevedeg enep pistriadurioù 'zo.

trophozoïte ◇ **trophozoït** ◇ **trofozoït s.** Furm struzhek, gweredus, heloc'h, ankistek, ur protozoenn (amoeb, *Plasmodium*). Gant ar *Plasmodium*, kentañ lankad eneritrokitel kor gouennañ anrevel (skizogonek) an arvevad eus ar baludegezh.

tropomyosine ◇ **tropomyosin** ◇ **tropomiozin g.** Protein kaherel o tasperzhiañ a-ser gant an troponin e lankad prientiñ an argrezañ. Er paouez er gigenn e vir ar protein edañvennek-se ouzh an edañvennoù aktin a erwezhañ gant ar miozin ; ar bliavaat anezhañ gant an *troponin* a zelank, en enep, an argrezañ kaherel.

troponine ◇ **troponin** ◇ **troponin g.** Protein kaher a zelank gwered an tropomiozin, o kevarezañ an argrezañ kaherel.

Trother : **triade de** ~ ◇ **Trother's triad** ◇ **triad g. Trother** Teskad tri azon : skouarnost, bouzarded ha strafuilhoù fiñval ar gouel stavn, arsellet e degouezh a gankr ar fric'hargadenn dinodet en dro da igorenn ar gorzenn glevedel.

trou électrique : **phénomène du** ~ ◇ **window effect** ◇ **anadenn b. an toull tredanel** E degouezh a angwazhiad ar c'haher kalon en ec'honenn speur ar c'hofig en he fezh e tremen pep tra evel pa vije treuzkaset an tredanvarr leiel enkavennel d'an elektrod argalonel lec'hiet a-dal d'ar rannbarzh marvennet, a wered evel ur prenestr digor a-dreuz da speur ar galon, o vezañ anniñv ent tredanel ; an kez anadenn a zeu war wel war ar c'halonvarrvezed dre ur wagenn herrek leiel QS.

Trousseau : **point apophysaire de** ~ ◇ **Trousseau's apophysary point** ◇ **poent g. Trousseau baleg ar mellennoù** Laur dihunet dre bouezañ war valed spernennek ar vellenn o klotañ gant an nervenn glañv e degouezh a nervost.

Trousseau : **syndrome de** ~ ◇ **Trousseau's syndrome** ◇ **azoniad g. Trousseau** Tromboz gwazhiennel o rouestlañ dedro ur gwadnaoued pe ur c'hankr.

Troyer : syndrome de ~ ◇ **Troyer's syndrome** ◇ **azoniad g. Troyer** Kevreted (deskrivet en Ohio gant an Amiched) ur pevargouseizi dasstrizhek, ur migevaot ilpennek ha fiñvoù koreoatetozek o tarvezout er bugelvezh.

truncus aorticus ◇ **pseudotruncus arteriosus** ◇ **truncus aorticus, gaougef g. talmerel** Kammneuziad c'hanedigel ar galon, oc'h erwereañ ur c'hef *talmerel* dre ma ne hañval dinodiñ eus diaz ar galon nemet ur wazhiedenn vras, diforc'h diouzh ur c'hef gwir, avat, dre vezañs ur rouedad talmerel a-skevent disparti ha diles a zo anvollek ar c'hef boutin anezhi. An daolenn glinikel zo hini ur c'hleñved glas marvus ent emdarzh kent an oad a 10 pe 15 vloaz.

truncus arteriosus ◇ **truncus arteriosus** ◇ **truncus arteriosus, kef g. talmerel** Kef talmerel boutin diwar zreistpad ar c'hengef talmerel rizhellel (ezvezañs an tilhennadur eus an ognonenn dalmerel). Eus an kez kef, ganet a-c'haoliad war an daou gofig dreist ur c'hehentad etre-kofigoù, e tiwano skourrou an aortenn hag an talmerennoù skevent dehou ha kleiz. An daolenn glinikel zo hini ur c'hleñved glas marvus ent emdarzh kent an oad a 15 vloaz. E degouezhioù 'zo e c'haller embreger oberatadenn Rastelli.

trypanide ◇ **trypanid** ◇ **tripanid g.** Dispuilhad eritematus an tripanozomiaz afrikat, liesstumm e neuz (plakad ruzvouk a drolinennoù direoliek, brizhenn arrot).

trypanocide ◇ **trypanocidal** ◇ **1 tripanozomlazh aa. 2 tripanozomlazher g. -ioù** 1 Gant ar perzh lazhañ an tripanozom. 2 Danvezenn tripanozomlazh.

Trypanosoma cruzi ◇ **Trypanosoma cruzi** ◇ **Trypanosoma cruzi** Spesad arvevaded eus ar genad *Trypanosoma* kiriek d'an tripanozomiaz amerikad pe kleñved Chagas (sl. *Chagas : maladie de ~, thyroïdite parasitaire, trypanosomiase américaine, fièvre barbeiro*).

trypanosome ◇ **trypanosoma** ◇ **tripanozom s.** Genad protozoed flagellek, gwerzhidek, oc'h arvevañ e-barzh ar gwad ha gwezherioù spesadel kleñvedoù 'zo a 'r broioù tomm.


trypanosomiase, trypanosomose ou trypanosomatose ◇ **trypanosomiasis** ◇ **tripanozomiaz g.** Anv genadel ar c'hleñvedoù devoudet gant arvevaded eus ar genad *Trypanosoma*, en o zouez kleñvedoù milzarreuziat o reuziañ dreist holl an ekuideged hag ar bovideged : kleñved an tsetse pe *nagana* (trezouget gant *Glossina palpalis*), ar surra (devoudet gant *Trypanosoma evansi*), an dourin (devoudet gant *Trypanosoma equiperdum*) ha droug Caderas e Suamerika (diwar *Trypanosoma equinum*) hag daou gleñved o tizhout an den : an *tripanozomiaz afrikat* (kleñved ar c'houk) hag an *tripanozomiaz amerikad* (sl. *Chagas : maladie de ~, thyroïdite parasitaire, trypanosomiase américaine, fièvre barbeiro*).

trypomastigote ◇ **trypomastigote** ◇ **tripomastigot aa.** Gant ur skourjezig e stumm un talar. — *form dripanomastigot* (Gl. *forme t.*) : stad dedreñ arvevaded flagellek 'zo heñvel ouzh *form oadour* amredat an tripanozom (sl. *amastigote, épimastigote* ha *protomastigote*).

trypsin ◇ **trypsin** ◇ **tripsin g.** Enzim pennañ ar c'hoaz-hañ endalc'het e-barzh borc'hadur an ilgreiz, o tisoc'h eus gwered an enterokinaz a 'r sug pervez war an tripsinogen borc'het gant an ilgreiz. Treluskañ a ra an tripsin dourrannadur polipeptidoù 'zo. Arveret eo bet evel lec'hangevezh e prederiadur goulioù, pugnezoù, angreizhoù, h.a. (sl. *trypsinogène, antitrypsine, mucoviscidose* ha *kallikréine*).

trypsinogène ◇ **trypsinogen** ◇ **tripsinogen g.** Ragenzim anniñvek borc'het gant an ilgreiz, treuzfurmet gant an enterokinaz e tripsin niñvek.

tryptophane ◇ **tryptophan, tryptophane** ◇ **triptofan g.** Amindrenkenn andioueradus d'an den, bezant en darn vrasañ eus ar proteinoù, o vezañ dilaosket diouto gant gwered an tripsin. Diaraoger ar serotonin eo.



tubage duodénal ◇ **duodenal intubation** ◇ **pibennañ an daouzegenn** Ebarzhiñ dre an treizher hag ar stomok ur gorzenn voan kaoutchoug pe vezell, outi en he fenn un ambeg olivennek gant boulc'henoù, amkanet da erlemel standilhonoù bestl pe sug ilgreiz pe da ensinklañ liaoù war al lec'h.

tubage gastrique ◇ **gastric intubation** ◇ **pibennañ ar stomok** Ebarzhiñ er stomok dre an treizher ur gorzenn gaoutchoug pe vezell, araezus da erlemel standilhonoù sug kreuz pe da engwelc'hiñ ar stomok.

tubage du larynx ◇ **intubation of the larynx** ◇ **pibennañ ar c'harloc'henn** Ebarzhiñ er c'harloc'henn ur gorzenn reut evit keraezañ tremen an aer, war-benn eztennañ ur c'horf estren, diogeliñ ur gwenterezh mat e-doug un dieraeziñ hollek, erlemel borc'hadennoù er briant, da skouer.

tubaire ◇ **tubal** ◇ **1 korzennek** aa. **2 korzennel** aa. **3 korzennat** aa. 1 A-zivout ar vouezh o tregerniñ e diabarzh ar bruched (mouezh vronkezel); a-zivout ur sourr (korzennek) dibarek devoudet gant anaezioù 'zo evel ar skeventfo, ar c'hreznennfo. 2 A-zivout korzenn ar grozh (sl. *fécondation in vitro*). 3 Lec'hiet e korzenn ar grozh, evel ar *vec'hiegi gorzennat*.

tube neural ◇ **neural tube** ◇ **kanol b. an arc'hnerveg, arc'hnerveg b.** Anv roet da andenn an arc'hnerveg goude ma vez dlidet, eginenn ar reizhiad nervel kreiz.

tuber cirereum ◇ **tuber cirereum** ◇ **bos g. luduek** Ec'honneuz steuñvenn louet oc'h amparañ un darn eus leur draoù an trede kamb empenn, lec'hiet etre, a-ziadreñv ar c'horfoù bronnheñvel, hag a-ziaraok gweltre ar gwelad.

tubercule ◇ **tubercle** ◇ **1 balirad g., tosenn b., turumell b., torzhell b. 2 torzhell b., ozvenn b.** 1 Er gorfadurezh, tosenning arront lec'hiet war c'horre un organ, un askorn. 2 En neuzkleñvedouriezh (naouedouriezh), nep anaf kroc'hen arront leun eus an derm don o tedreñ etrezek kleizennoù (sifiliz, lupus, h.a.). An torzhelloù zo anafoù naoues d'an dorzhellegezh (ozvennoù torzhellek).

tubercules quadrijumeaux : syndrome des ~ ◇ ◇ **azoniad b. an turumelloù** Teskad ar sezioù devoudet gant un tizhad eus to troadoù an empenn, ar peurliesañ diwar ur yoc'henn eus rannbarzh ar c'hourjadenn. Un anaf eus an *turumelloù krec'h* a zevoud strafuilhoù ar mab lagad (mabusvoll seiziel gant distroll an damougoù ouzh an argeidañ hag ouzh al luc'h) hag ur seizi eus fiñvoù damougek ha diarzoug a-zerc'h al lagad. Un anaf eus an *turumelloù traoñ* a zevoud strafuilhoù ar c'hleved un-pe daoudou. An kez sezioù a vez kevredet alies gant un azoniad eus dourbont an empenn (sl. *pédonculaires ou mésencéphaliques : syndromes ~*).

tubercules des trayeurs ◇ **milkers' nodules** ◇ **ozvennoù l. (b.) ar c'horoerion** Kroc'henad dibaot du-mañ diwar ur poksviruz, amparet gant nozel dilaur pe debronek un tammig o tizhout daouarn ar c'horoerion. An nozel, ur c'hwezigen war ar beg anezho, a bare dindan 15 devezh. Heñvel eo an anaez-se ouzh kroc'henfo burbuennek tredizhus an deñved, devoudet gant ur viruz nes.

tuberculide ◇ **tuberculid** ◇ **tuberkulid g.** Anv genadel evit an anaezioù kroc'hen diwar ur c'hizidikadur eus ar bevedeg ouzh an dorzhellegezh, hep ma ve kavet nemeur ar vazhell Koch. Ar c'hemm a vez lakaet etre an "dorzhellegezh wir" hag an tuberkulid a hañval hiziv an deiz bezañ danzeadel (sl. *folliclis*).

tuberculine ◇ **tuberculin** ◇ **tuberkulin g.** Protein gounezet diwar silañ tiñvadennoù *Mycobacterium tuberculosis*, arveret evit deznaou ar poread torzhellek gant an den hag al loened. Lakaat a ra war wel un dreistkizidigezh daleet e dianlen ar poread (bremanel pe diagent) gant mikobakteri (sl. *cutiréaction*).

tuberculisat ◇ **tuberculisat** ◇ **torzhellekaat** Erialerezh ar bevedeg gant bazhilli an dorzhellegezh (*Mycobacterium tuberculosis*).

tuberculoïde ◇ **tuberculoïd** ◇ **1 torzhellvanek** aa. **2 tuberkuloïdel** aa. 1 E stumm un dorzhell. 2 Heñvel ouzh an dorzhellegezh.

tuberculome ◇ **tuberculoma** ◇ **tuberkulom g.** 1 Pugnez torzhellek. 2 Nozelenn c'haouyoc'hennel a c'hell klotañ ouzh ur pugnez kozh torzhellek keuzennek enkistet, pe ouzh un nozelenn geuzennek war stirekaat.

tuberculose ◇ **tuberculosis** ◇ **torzhellegezh b.** Pore tredizhus diwar *Mycobacterium tuberculosis* (bazhell koch), boutin d'an den ha da loened 'zo (bovideged pergen), naoues *ent neuziadurel* dre an torzhelloù. *Ent klinikel* ez anad furmoù liesseurt kenan, hervez sez an enkoriñ, astenn an anafoù (bevennet d'un organ pe strewek pe strewekoc'h), ar mod dedreñ (lemm, goulemm pe henek) ha derez herzel ar bevedeg. Ar peurliesañ e vezer poreet dre analañ, ar sezioù paoañ o vezañ ar skevent.

tuberculose pulmonaire ◇ **pulmonary tuberculosis** ◇ **torzhellegezh b. ar skevent** Sezet er skevent ez anad argerzh an dorzhellegezh dindan div furm : — an *dorzhellegezh skevent serr* (Gl. *t. p. fermée*) : n'emañ ket an anafoù e kehent gant ar bronkez ha n'eus ket bazhilli Koch er skopadoù. — an *dorzhellegezh skevent digor* (Gl. *t. p. ouverte*) : an anafoù zo gwehennet er bronkez ha tredizhus ez a ar c'hleñved en arbenn eus bezañs bazhilli Koch er skopadoù.

tuberculostatique ◇ **tuberculostatic** ◇ **1 torzhellharz** aa. **torzhellharzer g. -ioù** 1 A skoilh ouzh neridigezh bazhilli Koch (streptomikin, izoniazid, h.a.). 2 Gwezher torzhellharz.

tubérosité ◇ **tuberosity** ◇ **1 torzhell b., torosenn b., bos g., skodenn b., arskodenn b., baleg g., tric'hogn g. deun g.** 1 Er gorfadurezh e vez graet gant an hanc'herioù meneget⁴. 2 Parzh bolzennek un organ, *deun ar stomok* da skouer (*fundus ventriculi*).

D-tubocurarine ◇ **D-tubocurarine** ◇ **D-tubokurarin g.** Alkaloid ar c'hurar, goubaret diouzh *Chondodendron tomentosum*, arveret evel istanter en dieraeziñ.

tubotympanite ◇ **tubotympanitis** ◇ **korzenntabouinfo g.** Tanijenn diaser ar gorzenn glevedel hag an taboulin keñverek. Bez' ez eo ur c'hrennskouarnfo.

tubule rénal ◇ **renal tubule** ◇ **tuellenn b. al lounezh** Furmadur kanoligeek an nefron, o tont da heul ar bloueig, o c'hoarvezout war un hed 50-55 mm ent keitat eus un diazkennenn diavaez, goloet gant kelligoù epiteleel en dro d'un oaled kreiz ma tremen an troazh. Hervez ar rann eus an duellenn ez eo disheñvel an epitelienn dre he luniadezh hag he arc'hwel. Lerc'h-ouzh-lerc'h adalek blein troazh ar bloueig e tiforc'her : a) ar bibell nezek outi ur rizenn vroustek e tu an oaled; b) kizenn Henle, o sankañ er vezonenn, gant ur barr moan pe a-ziskenn hag ur barr ledan pe a-sevel; c) ar bibell bellek oc'h astremen e-kichen blein gwazhiedel an un

⁴ Guy Étienne, *Geriadur ar Gorfadurezh*, Eil embannadur reizhet, Preder, 1999

nefron hag o tiskouez el lec'h-se un tachad ma 'z eo uheloc'h ha douesoc'h ar c'helligoù epiteled, o furniñ ar *macula densa*, lodek er benvegad nesbloueig; *d*) ar bibell dastum, o kemberiñ gant pibelloù dastum all a-raok difourkañ er vegenn lounezh (sl. *néphron*).

tubulé : **épiphéliome** ~ ◇ **columnar and cylindrical epithelioma** ◇ **epiteliom g. pibellek** Seurtad epiteliom naouus dre vezañs kranennoù leun a epitelienn liac'hek na heuilhont ket dedro an ezkroc'hen, e-kreiz ur stroma a wiad kenglenel pe rizhellel. Ar c'*hilindrom* zo da renkañ er seurtad yoc'henn-se.

tubulémie ◇ **Winckel disease** ◇ **kleñved g. Winckel, tuellennruzegezh b.** Kleñved grevus an nevezc'hanidi, diwar ar strepokok pe ar c'holibazhilli, naouus *ent klinikel* dre ul livrezh gell chokolad eus ar c'hroc'hen, un dulaz eus an divweuz, ar bizied daouarn ha treid, dre ul livrezh gouikterel ar c'hevresaeoù, dre wadliñvoù (troazhwadegezhioù) hag ur felc'husvent; an disoc'h a vez hogos atav ar marv; ha naouus *ent neuziadurel* dre vezañs ruzkelligoù e tuellennoù al lounezh.

tubuline ◇ **tubulin** ◇ **tubulin g.** Protein parzhiat e korribelloù ar werzhid vitotek. Heudañ a ra arc'hwel ar c'horribelloù, ha tolc'hañ emrannadur ar gellig, o c'hoari enta, evel mitozastaler, roll ur pistri eus ar werzhid.

tubulopathie ◇ **tubulopathy** ◇ **tuellennanaez g., tuellennaoued g.** Termen rumm oc'h aroueziñ un teskad naouedoù lounezh hêrezhel pe c'hanedigel naouus dre ur miarc'hwel eus tuellenn al lounezh.

tubulorhexis ◇ **tubulorrhexis** ◇ **tuellennedvidañ, tubuloreksiz g.** Freg tuellenn al lounezh arsellet dreist holl el lounezhadoù pibellentremezel lemm.

tuftsine ◇ **tuftsin** ◇ **tuftsin g.** Globulin amparet gant peder amindrenkenn (tetrepeptid) o werediñ war ar fagokit evit blivaat ar fagokitoz.

tularémie ◇ **tularaemia** ◇ **tulementiezh b.** Pore diwar *Francisella tularensis*, o tizhout al loened pergen, ent dibarek ar c'hriagnered gouez; gant al loened doñv e c'hell bezañ grevus kenan, marvus ar peurliesañ. Poreet e vez an den gant flemmadennoù tarlask pe voui, pe dre ar stekiñ eeun ouzh loened poreet. Ur milanaez eo. Deraouiñ a ra dre un anaf gouliezek lec'hiek (livant enkoriñ), sezet diouzh an dro war an daouarn pe ar gevresae, gant c'hwarrrenn. Gwrestervezh an dedro a bad etre div ha peder sizhunvezh. Arsellet e vez ar c'hleñved er Stadoù-Unanet, e Japan, e Norzheuropa ha du-mañ nevez 'zo.

tularine ◇ **tularine** ◇ **tularin g.** Antigen danzeet diwar diñvañ hadenn an dularemiezh hag arveret evit un entonnennerwezh. Gant ur gouzrec'h tizhet gant ar c'hleñved e vez yaek an erwezh adalek an 8vet deiz, mui pe vui, ha padout a ra lies mizvezh goude ar pare.

tuméfaction ◇ **tumefaction** ◇ **koefiñ, koefiv g., koefivadur g., koefivenn b.; azoued g.** Muiadur ec'honad un organ pe ur parzh eus ar c'horf, devoudet gant un argerzh foel (azoued) pe yoc'hennel, pe gant un ensiladur gouliñv.

tumeur ◇ **tumor** ◇ **yoc'henn b.** Nevezwe kleñvedel anfoel. Kemm a lakaer etre ar yoc'hennoù *kuñv* hag ar yoc'hennoù *yud* (*hanwe, kankr*), rannet etre ar yoc'hennoù *kentael* hag ar yoc'hennoù *eilvedel*, a zo dassezioù.

tumeur blanche ◇ **white swelling** ◇ **yoc'henn b. wenn** Arzfo torzhellek henek, dezhañ neuz ur goefivenn wenn, kuit a erwezh foel.

tumeur fissuraire ◇ ◇ **yoc'henn b. skarrel** Embriom (kist dermoidel, fiobrokondrom, angiom) dinodet war linennoù soutadur an novoù dremmel.

tumeur mixte ◇ **mixed tumour** ◇ **yoc'henn b. gemmesk** Yoc'henn kemmesket enni elfennoù kelligel o tont eus lies gwiad (epiteled ha kenglenel), yud ar peurliesañ, o trediñ buan pe vuanoc'h (sl. *dysembryome*).

tumeur royale ◇ ◇ **yoc'henn b. real** E kleñved Recklinghausen, ar yoc'henn groc'hen ec'honekañ.

tumorectomie ◇ **tumorectomy** ◇ **yoc'hennenezvenañ** Dilemel surjianel ur yoc'henn.

tumorlet ◇ ◇ **yoc'han g.** Yoc'hennig nozelek kuñv ent wiadurel (epitelienn ar bronkez) o tinodiñ e lies poent eus trobarzh ar skevent, war dachadoù kleizennel.

tungose ◇ **tungiasis** ◇ **tungoz g.** Anaek ar broioù tomm diwar sankadur pazed bec'hiek an turc'hwen e-barzh ar c'hroc'hen. Laurus e vez al lec'h enteñ, war ar bizied treid ar peurliesañ; ruz da gentañ, gant ur pik du war ur grugenn arwenn da c'houde, gwenaennek dizale, en dro dezhi un tachad eritematus. En ervez emañ da vezañ poent loc'hañ ur poreadur lec'hiek pe hollek (sl. *chique, puce chique, puce des sables*).

tunique ◇ **tunic, tunica** ◇ **sae b.** Goloenn, lienennek alies, un organ pe ur ganol.

tunnel aorto-ventriculaire gauche ◇ **aortico-left ventricular tunnel** ◇ **riboul g. aortenn-kofig kleiz** Kammneuziad kalon dibaot, o kehentaat an aortenn (e par god kuruner an aortenn dehou) hag ar c'hofig kleiz dre un treug loet en tilhenn etre-kofigoù, a-ziadreñv founilh ar skevent. Ent klinikel ez arwere ur skorted aortek muiet. An aortennluniñ a zemera an treug ezreol. Ar surjianerezh kentrat a ro disoc'hoù mat kenan.

tunnelisation ◇ **tunneling** ◇ **tunnelaat** Danzen ur ganol e stumm ur riboul, goloet penn da benn gant ar gwiadoù ma 'z eo bet savet.

tuphos ◇ **typhoid state** ◇ **tufoz g.** Stad a valouen, a vantridigezh eizhañ, gant un enebrezh difiñv ha saouzanet, arsellet er furmoù grevus eus poreoù 'zo, an tifoid en o zouez.

TUR : **syndrome** ~ ◇ **TUR syndrome** ◇ **azoniad g. TUR** Teskanv ar Sz. *transurethral prostatectomy syndrome*, eleze *azoniad ar raksavennevezvañ tregantroazhel*, anezhañ pistriadur gant an dour o tarvezout dre berzh sugadur gant ar reizhiad wazhiedel al liñvenn eroueriañ e-doug an oberatadenn (sl. *hypotonie osmotique du plasma* : *syndrome d'~*).

turbidimétrie ◇ **turbidimetry** ◇ **leidventerezh g.** (sl. *opacimétrie, turbidimétrie*).

turbidité ◇ **turbidity** ◇ **leiter g.** Neuz leidek ul liñvenn, un dierc'had en arlug enni.

turbinectomie ◇ **turbinectomy** ◇ **krogenezvenañ** Dazbidañ unan eus kregin ar fri.

Turcot : syndrome de ~ ◇ **Turcot's syndrome** ◇ **azoniad g.** **Turcot** Kevreted ur polipoz a-golon familhel ha gliomou yud a 'n nerveg kreiz (sl. *polypose*).

turgescence ◇ **turgescence** ◇ **lanvidikaat, lanvidigezh b.** Muiadur ec'honad ur parzh eus ar c'horf dre azdalc'h gwad gwazhiennel.

turgor ◇ **turgor** ◇ **turgor g.** Lanvidigezh angouliñvek an amwiskadoù pe un organ, o reiñ ouzh an teuta ur santad harz ha koeñvadur dastennek.

turista ou **tourista** ◇ **turista** ◇ **tourista g.** Anvet ivez *darc'hoal ar beajour*, diwar ur golibazhell bervezkleñvedus.

Türk : cellule de ~ ◇ **Türk's cell** ◇ **kellig b.** **Türk** 1 Seurtad proplasmokit etre 7 hag 20 µm, vigelc'hiek, bezant er gwad er stad kleñvedel hepken, naouus dre ur graoñell ezkreizet, teñval, saezhennek hag ur protoplasm bazennlen kenan. 2 Mononuklear bras ortobazofil (leukoblast, mieloblast).

Stilling-Türk-Duane : syndrome de ~ ◇ **Stilling-Türk-Duane syndrome** ◇ **azoniad g.** **Stilling-Türk-Duane** Azoniad lagadel untu ganedigel, paotoc'h gant ar beneved. Naouus eo dre ur bevennadur eus fiñvoù eztañ al lagad ha, da-geñver ar finvoù entuañ, dre un dreklagadegzh gant strishadur faout ar malvennoù; bez' ez eus ouzhpenn se un emzalc'h pennngamm, ar penn o vezañ troet war-du al lagad klañv. An kez azoniad a ve a-zalc'h gant ur fibroz eus ar gigen eun kostezel (sl. *myopathie primitive progressive*).

Turner ou **Turner-Albright** ou **Turner-Ullrich : syndrome de ~** ◇ **Turner-Albright syndrome** ◇ **azoniad g.** **Turner-Albright** Azoniad arsellet gant ar rev venevel, naouus dre ur gorrded gant un neuz bugelvanek, un angwe hollel eus ar vierezoù (pe eus ar c'hrakvierezoù) hag un teskad *kammneuziadoù* o tizhout : ar brusk (ledanaet e skoed), an dremm hag ar gouzoug (pterigion gouzoug, ptoziz, skarlagadegzh, epikantuz, divskouarn ledan ha setez izel, korregezh gaved), an izili (ilin ezkamm, ezreolderioù an daoulin, an daouarn hag an treid); nevuizioù, ul limfe'houliv, kammneuziadoù kalongwazhiedel (an aortenn : goudag; isvoll skeventel) ha kammneuziadoù al lounezh, al labanded zo da lakaat ouzhpenn en hollad. — Ur c'hleñved dre c'houkoevad kromozomel eo. *Ent hilel* e vez, peurvuiañ, savelet gant ur fenotip benevel hag ur rev c'henrizhel gourevel ha gant bezañ ur c'hromozom revel X hepken, disoc'h uniadur ur vigellig pe ur spergellig douger an kez kromozom gant ur gamet all hep kromozom revel ebet. Ar genrizh a c'hoarvez neuze a 45 kromozom (e-lec'h ar 46, niver reol) gant un delun gonozomek XO (⁴⁵XO). — E-kichen ar furm glasel-se e teskriver *seurtadoù anrizek* dre o neuziadur, dre vezañ un arc'hwel gonadel pe zoken vierezoù reol, dre o delunioù gonozomek kemplezh pe gempleshoc'h : mozaikoù ⁴⁵XO/⁴⁶XX, ⁴⁵XO/⁴⁷XXX, XO/XY, h.a., delunioù XXX pe XX gant ezreolderioù luniadur a 'r c'hromozom X; hag ivez un *azoniad Turner gourevel* (Flavell, 1941) gant fenotipoù gourevel, bezañ klidennoù ezreol ar peurliesañ ha genrizh ar peurliesañ reol XY. — Aozerion 'zo (Polani, 1961) a amberz an termen *azoniad Turner* (gant ar plac'h pe ar paotr) evit an degouezhioù o kevredin, d'an neuz klasel, un anpar (pe ur mibar) gonadel hag ur genrizh hogos atav ezreol; anv a reont eus *azoniad Ullrich* (gant ar plac'h pe ar paotr) pa revez ar merkoù neuziadurel o unan, ar gonadoù hag ar genrizh o vezañ reol; an hollad o vezañ deanvet dre an termen *azoniad Turner-Ullrich* (sl. *sexe nucléaire, monosomie, cariotype*).

Turner : signe de ~ ◇ **Turner's sign** ◇ **arouez b.** **Turner** Dinodadur bronduennoù e rannbarzh ar begel un nebeut devezhioù war-lerc'h deroù un ilgreizfo lemm.

tussigène ◇ **tussigenic** ◇ **pazus aa.** O tevoudañ ar paz.

tussipare ◇ **tussive** ◇ **paseiat aa.** A-zivout un tachad eus ar bevedeg en ervez da zelankañ ur paz damoug, pa vez heget. Lakaet er-maez ar forzhioù analañ, emañ an tachadoù-se en ode diavaez ar c'hleved, en hueg, er stomok, er pervez, en avu, er felc'h hag en organoù genel.

tutelle ◇ ◇ **heforzhouriezh b.** Hanren gwareziñ an angougoneion vuiek, ma emañ ar gouzrec'h derc'houezet penn da benn gant un *heforzhour* a ensamm en e lec'h mererezh e c'hlad (sl. *incapable majeur*).

tuyaux d'orgue : images en ~ ◇ ◇ **skeudennoù l. (b.) e stumm korzennoù ograoù** Erzerc'had skinlun furmet gant kevelod skeudennoù douraezhel liesel, arsellet a-wechoù en antreizh pervez lemm.

Twiddler : syndrome de ~ ◇ **Twiddler's syndrome** ◇ **azoniad g.** **Twiddler** Miarc'hwel un adalf devoudet gant dornata an ardivink ha, dre se, tenañ ar sontoù eus al lec'hioù ma rankont bezañ. A-feur ma fiñv an andreougoù e paouezont a gelluskañ ar galon, en ervez da zec'han azonoù iskis, evel ur fraouadur eus nervenn ar vegin o telankañ poulzadoù kof pe ur fraouadur eus plezhad ar vrec'h o tevoudañ argrezadoù korvezek an divvrec'h.

tylome ◇ **tyloma** ◇ **tilom g.** Koeñvenn garnek.

tylose ou **tylosis** ◇ **tylosis** ◇ **tiloz g.** Kaledenn, klavig.

tympan ◇ **tympanum** ◇ **taboulin b.** 1 *Kavenn an daboulin* (Gl. *caisse du tympan* Sz. *tympanic cavity*) : kavenn ar skouarn grenn, loet etre ode diavaez ar c'hleved hag ar skouarn diabarzh. Treuzet eo gant ristenn an eskernigoù (ar morzhol, an annev, ar stleug). Kehentiñ a ra a-ziaraok gant ar gorzenn glevedel, oc'h askouezhañ a-ziadreñv dre gannou ar vrennigenn. 2 *Liennenn an daboulin* (Gl. *membrane du tympan* Sz. *tympanic membrane*) : lienenn stirek ha dastennek o tispartiañ ode diavaez ar c'hleved diouzh kavenn an daboulin.

tympanique ◇ **tympanitic** ◇ **1** *˜an daboulin, ˜kavenn an daboulin, -taboulin 2 taboulinek* aa. **3 a-daboulin** 1 A-zave d'an daboulin, da lienenn an daboulin, da gavenn an daboulin. 2 Perzh ur sten heñvel ouzh an hini a vez graet o skeiñ war un daboulin, naouus d'an daboulinegezh a-zave d'an taboulineg, lodenn a-daboulin an askorn ividig.

tympanisme ◇ **tympanism** ◇ **taboulinegezh** b. Trouz dibarek a glever o kiziata un organ dardennet gant aezhennoù, ent arbennik ar c'hof diwar reñver aer pe aezhennoù er bouzeloù pe e kavenn an ampelem (sl. *météorisme*).

tympanite ◇ **tympanitis** ◇ **taboulinfo** g. Tanienn lienenn pe kavenn an daboulin.

tympanométrie ◇ **tympanometry** ◇ **taboulinventañ** Muzuliañ filusted ar skouarn grenn (taboulin ha ristenn an eskernigoù) a-gevreizh da argemmoù gwask en ode diavaez ar c'hleved.

tympanoplastie ◇ **tympanoplasty** ◇ **taboulinatelviñ** Oberatadenn amkanet da barraat ouzh anafoù kleizennel lienenn hag a-wechoù kavenn an daboulin e dianlen ur skouarnfo henek. C'hoarvezout a ra eus arloadur un imboud kroc'hen pe lienstirenn war dreloezad an daboulin gant, alies, ratreadur anafoù ristenn an eskernigoù.

tympanosclérose ◇ **tympanosclerosis** ◇ **taboulinskleroz** g. Skleroz an daboulin o tevoudañ ar vouzarded.

Tyndall : **phénomène de ou effet de ~** ◇ **Tyndall's effect** or **phenomenon** ◇ **anadenn** b. pe **gwered** g. **Tyndall** Amstrewiñ al luc'h gant rannigoù en arlug en ul liñvenn pe un aezhenn. Arveret e vez ar c'halvezder-se evit imbours'hiñ kambra arak ar voull lagad.

tyndallisation ◇ **tyndalization** ◇ **tindallekaat, tindallekadur** g. Hentenn ranndishadennañ ma vez arveret ar wrez ent spanaennek, o kevaraezañ diorreadur ar spor e furmoù odour, aesoc'h da zistrujañ.

typage ◇ **typing** ◇ **risha** Rummañ an hiniennoù hervez o rizh. En hangaeoniezh, hentenn arveret da hennadiñ un antigen douget gant ur gellig eus ar gwad. Evit se ez arverer ur skinizotop, ul livuzenn, un enzym pe un antikorff spesadel.

type ◇ **type** ◇ **rizh** g. Naouusterioù kreudel ha bredel an hiniennoù, araezus d'o ebarzhiñ e rummoù pe strolloù savelet.

typhique ◇ **typhic** ◇ **1 tifek** aa. **2 tifeg** g. **-eion** 1 Gant pe a-zave d'an tifiz eksantematek, da skouer ar *stad tifek*. 2 Gouziviad tifek.

NOTENN : E Gl. *typhique* a ra dave ivez d'an *derzhienn difoidel*, termen ankewer, hogen arveret alies. An adanv Gl. *typhoïdique*, reishoc'h, a vez arveret nebeutoc'h. N'eus abeg sonn ebet da vont da heul, hag evit ar ster-se e vo graet gant *tifoidel* evit "a-zave d'an tifoid" ha gant *tifoidek* "gant an derzhienn difoidel", *tifoideg* "gouziviad an tifoid".

typhlite ◇ **typhlitis** ◇ **sac'hennfo** g. Tanienn ar sac'henn.

typhlo-appendicite ◇ **typhlo-appendicitis** ◇ **sac'henndivilhennfo** g. Tanienn an divilhenn hag ar sac'henn, a orin bakteriel ar peurliesañ.

typhlocolite ◇ **typhlocolitis** ◇ **sac'hennkolonfo** g. Tanienn ar sac'henn hag ar c'holon a-sevel.

typhlomégalie ◇ **typhlomegaly** ◇ **sac'hennusvent** g. Usvent ar sac'henn devoudet gant boued struzhel a ro dilerc'hiadoù paoterek, bonan e kemm diouzh ar *sac'hennusvoll* a zo anvanon.

typhloplexie ◇ **typhloplexy** ◇ **sac'hennAanlenañ** Festañ surjaniel ar sac'henn ouzh speur ar c'hof, amkanet da barraat ouzh fiñvusted re vras ar sac'henn hag ouzh ar strafuilhoù da heul.

typhlosigmoidostomie ◇ **caecosigmoidostomy** ◇ **dasforzhañ sac'henn-sigma** Dasforzhad etre-kilblegoù etre ar sac'henn hag ar c'hilbleg sigma.

typhobacilliose ◇ **typhobacillosis** ◇ **tifobakilloz** g. Furm kentporead torzhellek naouus dre vezoud un derzhienn a neuz kelc'h troek gant diwresteriñ gorrek, o reiñ dezhi un heñvelled klinikel bennak ouzh an derzhienn difoidel.

typhoïde ◇ **typhoid** ◇ **1 tifoidel** aa. **2 tifoïd** g. 1 A zo heñvel ouzh an tifiz. 2 Heñvelster : *terzhienn difoidel* (sl. *fièvre typhoïde, typhoïde*).

typhoïdique ◇ **typhoidal** ◇ **1 tifoidel** aa. **2 tifoïdek** aa. **3 tifoïdeg** g. **-eion** 1 A-zave d'an tifoid. 2 Gant an derzhienn difoidel 3 Gouziviad an tifoid.

typhus ◇ **typhus** ◇ **tifuz** g. Termen genadel dispis o teanviñ gwechall kleñvedoù diseurt naouus gant ur stad a valouen, arveret hiziv e unan gant ar ster *tifiz eksantematek*. — *tifiz amaril* : sl. *fièvre jaune, fièvre amarile, vomito negro*. — *tifiz eksantematek* (Gl. *typhus exanthématique* Sz. *exanthematic typhus*) : pore, tredizhus ha darreuziadek, diwar *Rickettsia prowazeki*, ha treuzkaset gant al laou. Stad pistriboreel lemm, kizidik ouzh ar bevestalerioù. — *tifiz logodel* (Gl. *typhus murin* Sz. *murine typhus* ; *flea born typhus*) : pore bro- ha bedreuziat diwar *Rickettsia mooseri* treuzkaset d'an den gant c'hwen ar rashed. Heñvel eo an daolenn glinikel ouzh hini an tifiz eksantematek, hogen bliñnaet eo an azonou, o steuziañ ent emdarzh a-benn teir sizhunvezh. — *tifiz ploueel pe trovanel Malaysia* (Gl. *typhus rural ou tropical de Malaisie* Sz. *rural typhus or tropical typhus (Malaya)*) : terzhienn eksantematek nes d'an tifiz, leteñvel ouzh terzhienn japanat ar stèrioù (sl. *fièvre fluviale du Japon, tsutsugamushi, fièvre des broussailles*).

typique : **tumeur** ou **épithéliome** ~ ◇ **typhus** ◇ **yoc'henn** b. **rizhek** Yoc'henn gant ul luniadur heñvel ouzh hini ar gwriad ma emañ o tinodiñ diwar e goust.


typologie humaine ◇ **human typology** ◇ **rizhouriezh** b. **denel, denrizhouriezh** Diskiblezh a studi ar rizhoù denel diseurt, a-geñver gant naouusterioù neuziadurel, bevedel, bredel ha kevredadel. Liesseurt eo ar rummadurioù rizhouriel denel (rummadur Kretschmer, rizhouriezh Jung, da skouer).

tyraminase ◇ **tyraminase** ◇ **tiraminaz** g. Enzim o tispenn an tiramin dre oksidañ.

tyramine ◇ **tyramine** ◇ **tiramin** g. Aminfenol pistriek furmet dre zekarboksilañ an tirozin. Perzhioù simpatomimetek zo dezhañ, rak dilaoskiñ a ra an noradrenalin eus al loadoù kadaviñ a zo dezhañ en dibennoù nerved adrenwerc'her. Pimpatrom ar simpatomimeteier ameeun, en en kaver e keuzioù go 'zo, e rizhoù gwin 'zo, e bouedoù diseurt hag er pigell.

tyrosinase ◇ **tyrosinase** ◇ **tirozinaz** g. Enzim o treluskañ enaoz melanin dre oksidañ an tirozin. Bezant eo e struzhennoù 'zo hag e loened 'zo, hag ivez e kroc'hen an dud.

tyrosine ◇ **tyrosine** ◇ **tirozin** g. Amindrenkenn bevanret dilaosket dre zourannañ proteinoù ar bouedoù. An darn vrasañ eus ar proteinoù zo enno etre 1 ha 6 % a tirozin; an insulin hag ar papain zo paot enno ar rizh amindrenkennoù-se (war-dro 13 %). An tirozin zo diaraoger an hormonoù skoedennel, ar c'hatekolaminoù hag ar melanin.



tyrosinémie ◇ **tyrosinemia** ◇ **1 gwadtirozinegezh** b. **2 gwadvec'h** g. **tirozin, tirozinwadvec'h** 1 Bezañs tirozin er gwad. 2 Feur tirozin er gwad.

tyrosinose congénitale ou **héréditaire** ◇ **tyrosinosis** ◇ **tirozinoz** g. **ganedigel** pe **hêrezhel** Kleñved enzimetek dibaot, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, diwar ur migennevid eus an tirozin, a zo an dispenn anezhañ skoilhet en arbenn eus ezvezañs un enzym, ar parahidroksi-fenil-piruvat oksidaz. Erzerc'hañ a ra dre zinodadur, ar peurliesañ gant ar bugel yaouank, ur c'hirroz, ha goude ul lec'h vitaminharzus hag un tuellennanaez. Kemmus e vez an dedro anezhañ, marvus a-wechoù dre skorted avu pe dre dreuzfurmadur yud ar c'hirroz.

tyrosinurie ◇ **tyrosinuria** ◇ **1 troazhtirozinegezh** b. **2 troazhvec'h** g. **tirozin, tirozindroazhvec'h** 1 Bezañs tirozin en troazh. 2 Feur tirozin en troazh.

tyrothricine ◇ **tyrothricin** ◇ **tirotrikin** g. Bevastaler eus stroll ar polipeptidoù diwar diñvadennoù *Bacillus brevis*, amparet gant 80 % tirokidin hag 20 % gramikidin. Pistriek eo an tirotrikin hag arveret e vez en arloadurioù lec'hiek evel bakterilazher er poreadoù diwar vakteri Gram +.

U

U ◇ **U** ◇ **U** 1 Berradur *unanenn*. 2 Arouez an *urakil*.

ubiquinone ◇ **ubiquinone** ◇ **ubikinon** g. Dezouger hidrogen a luniadur kinonek ha sezet er mitokondri, o tasperzhiañ er widenn analadel (sl. *chaîne respiratoire*).

ubiquiste ◇ **ubiquitous, omnipresent** ◇ **bedsezat** aa. A-zivout ur bevedeg loenel pe struzhel a gaver dre ar blanedenn a-bezh.

ubiquitine ◇ **ubiquitin** ◇ **ubikitin** g. Protein amparet gant 76 amindrenkenn, bezant e lies spesad loenel, struzhel ha bakteriel. Dasperzhiañ a ra en eznevid ar protein (ar proteinloezañ).

Uhl : **maladie d'~** ◇ **Uhl's anomaly** ◇ **kleñved** g. **Uhl** Angwe pe iswe ganedigel kalongaher ar c'hofig dehou a zo tanav ha treuzluc'h (kofig paperennek). Kleñved dibaot a zevoud gant ar vagadell ur skorted kalon, marvus buan kenan, en ervez da vezañ kevredet gant kammneuziadoù kalon all, anezhañ ar furm c'hrevusañ eus miwe ar c'hofig dehou.

ulcération ◇ **ulceration** ◇ **1 gouliez b., gouliezañ, angreizhañ 2 angreizh b.** 1 Nep argerzh kleñvedel o c'hoarvezout eus un odead diwar goll danvez en un amwiskad (kroc'hen, glaourgenn), o tisoc'h gant un *angreizh*. 2 Disoc'h ar gouliezañ, an angreizhañ.

ulcère ◇ **ulcer, ulcus** ◇ **angreizh b.** Koll danvez e par ar c'hroc'hen pe ur glaourgenn, ent dibarek pa vez izel an tuadur da gleizennañ, gant un dedro henek (sl. *ulcération*).

ulcère calleux ◇ **callous ulcer** ◇ **angreizh b. karnek** Angreizh kreuz-daouzegenn a-gozh, dezhi gwrimennoù balirek ha sklerozek, englenet ouzh an organoù nes.

ulcère hypertensif de Martorell ◇ **Martorell's syndrome** ◇ **angreizh b. uswaskel Martorell** Gouliezadur kroc'hen usufem diavaez laurus kenan, daoudou alies, arsellet gant an henaded uswaskel dalmerel, kilvers ouzh ar prederiadurioù boas.

ulcère en miroir ◇ **kissing-ulcer** ◇ **angreizh b. ragenep** Angreizh lavaret “diwar genstok” sezet a-dal d'un angreizh all en daouzegenn, war ar speur ragenep.

ulcère peptique ◇ **anastomotic ulcer** ◇ **angreizh b. peptek** Angreizh o tarvezout pell pe belloc'h goude ur c'hreuzpervez-forzhañ pe ur c'hreuzzevenañ, embreget ar peurliesañ evit angreizh ar stomok pe an daouzegenn. Sezet eo an kez angreizh war an difourk nevez, pe en e gefin war ar stomok pe war ar yunegenn.

ulcère phagédénique des pays chauds ◇ **tropical ulcer** ◇ **angreizh b. fagedenek ar broioù tomm** Anez ar broioù tomm naouus dre zinodadur, war an izili traoñ, dibaotoc'h war ar c'hef, eus ur gouliezadur aloubus an dedro anezhañ, en ervez da zevoudañ furmoù grevus a varvennoù ledek, o chom ar peurliesañ kantet d'an derm avat hag oc'h echuiñ gant ar pare.

ulcère simple de l'estomac ◇ **chronic gastric ulcer** ◇ **angreizh b. eun ar stomok** Anez o c'hoarvezout *ent neuziadurel* eus ur c'holl danvez don pe zonoc'h e glaourgenn ar stomok ha naouus *ent klinikel* dre laurioù argreuzel o tarvezout un nebeut eurvezhioù war-lerc'h ar predoù, dre wadc'hweladoù, dre un usklorhidregezh hogos bewech ha dre un dedro a-frapadoù. Emañ en ervez da zedreñ etrezek an treloezad ha bezañ ivez e par an treizher hag e darn gentañ an daouzegenn, eleze en holl barzhioù eus ar glaourgenn koazhadel e diraez ar sug kreuz treñkek. Angreizh ar stomok hepken zo en ervez da zic'henezhañ e kankr (angreizkkankr). Kevaraezet e vez dreist holl gant ar poreadur lec'hiek gant *Helicobacter pylori* ha gant an enepfoeier ansteroidel (sl. *antiulcéreux, pompe à protons, Helicobacter pylori, ulcère calleux, ulcère de stress*).

ulcère variqueux ◇ **varicose ulcer** ◇ **angreizh b. teuc'hellel** Koll danvez kroc'henel, ledek pe ledekoc'h, sezet war barzh pellek ar c'har, o tarvezout gant ar gouzrec'hioù dezho teuc'helloù.

ulcère vésical de Hunner ◇ **Hunner's ulcer** ◇ **angreizh b. c'hwezbigellel Hunner** C'hwezbigellelfo henek entremezel dianav an orin anezhañ gant gouliezadur e krec'h ar c'hwezbigell.

ulcères de stress ◇ **stress ulcers** ◇ **angreizhoù diwar stres** Angreizhoù kreuz-pervez bas lemm he dedro, liesel ha gwadliñvel alies, o tarvezout gant gouzrec'hioù dindan stresoù arreat ha garv : fromoù, stroñsoù, tennderioù, darwantadoù diseurt.

ulcères vénéroïdes de Welander ◇ **veneroid ulcers** ◇ **angreizhoù gwenervanek Welander** Gouliezoù hevonnn pukadek sezet war c'hlaourgennoù ganadel ar venev, o parañ ent emdarzh. Ne gaver hadenn dibarek ebet ha marteze ez eo ur seurtad afitoù.

- ulcèrocancer** ◇ **ulcerocancer** ◇ **angreizhkankr** g. Angreizh stomok a natur gankrek. Pe ez eo un angreizh yud a-gentizh pe, dibaotoc'h, un treuzfurmadur yud eus un angreizh eeun.
- ulcèrogène** ◇ **ulcerogenic** ◇ **angreisheiat** aa. A zec'han un angreizh.
- ulcus rodens** ◇ **rodent ulcer**, **Jacob's ulcer** ◇ **angreizh krignus** Epiteliom diazkelligel an enad sezet war an dremm hag ar gouzoug, e neuz o vezañ un angreizh argalet an diaz hag ar wrimenn anezhi ha naouus dre he distrujusted hag he dedro gorrek, arstalek avat.
- ulcus vulvae acutum** ◇ **ulcus vulvae acutum** ◇ **angreizh lemm ar c'hourzh** Angreizh laurus ar c'hourzh, arsellet gant ar plac'hed bihan ha yaouank. N'eo ket diluziet an arbenn anezhi : poreadur gant *Bacillus crassus* pe anaez nes d'an aftoù.
- ulcus vulvae simplex chronicum** ◇ ◇ **angreizh eeun henek ar c'hourzh** Angreizh henek, sezet e freilh adreñv ar muzelloù, arsellet gant ar merc'hed paouezet o mizioù.
- ulcus wall** ◇ ◇ **andell b. angreizh** Erien tev amparet gant ar glourgenn gouliñvek en dro da angreizh ar stomok e-doug ar resmiadoù laurus. War ar skinlunioù a-letu, emañ ar balir sklaer-se war lez neizh an angreizh, a hañval dre se bezañ donoc'h.
- ulérythème** ◇ **ulerythema** ◇ **uleritem** g. Kroc'henad eritematus naouus dre furmadur ur gleizenn ha, da heul, un isteñv a-vas eus an amwiskadoù.
- Ullrich-Feichtiger : syndrome de ~** ◇ **Ullrich-Feichtiger syndrome** ◇ **azoniad g. Ullrich-Feichtiger** Teskad kammneuziadoù o c'hoarvezout eus korreded, mideñvoù kloppendremmel ha pervezel (sl. *Smith, Lemlib et Opitz : syndrome de ~*).
- ulna** ◇ **ulna** ◇ **helmo** g. Askorn diabarzh an arvec'h oc'h amparañ gant ar werzhid an atel anezhi.
- ultracentrifugation** ◇ **ultracentrifugation** ◇ **dreisttronizhañ** Tronizhañ diwar-bouez un dreisttronizher en areaz da zistremen ur c'hweldizh brasoc'h eget 100 000 tr/min (sl. *centrifugation* ha *centrifugeur, centrifugeuse*).
- ultradiathermie** ◇ ◇ **dreisttrewrez g., dreisttrewrezañ (hertz)** Dedalvezout er gwrezkurañ ar gwagennoù hertz berr (gavaelet etre 2 ha 30 m).
- ultradien** ◇ **ultradian** ◇ **dreistdeziat** aa. A-zivout ul luskellad korvezek berroc'h eget 20 eurvezh; ur gorvez dreistdeziat zo dezhi un drovezh dindan 20 h (sl. *chronobiologie*).
- ultrafiltration** ◇ **ultrafiltration** ◇ **dreistsilañ** Silañ dindan wask diwar-bouez un dreistsil, na lez da dremen nemet rannigoù dreistkorrgreskerel, viruzoù pe rannigoù en un dileizhenn golloidel.
- ultramicroscope** ◇ **ultramicroscope** ◇ **dreistkorrgresker** g. Korrgresker skizhus kenan, ma vez durc'haet ar gouloù war gostez war an darbaradenn da imboure'hiñ. Kevaraezañ a ra arsellioù ergorennoù (rannigoù kolloidel, skourjezigoù, greunennadoù, h.a.) a zo anverzhadus dindan ar c'horrgresker ordinal, a zeu war wel goulaouet war ur goueled du.
- ultrason** ◇ **ultrasonic waves** ◇ **ussten** g. Froum sten dezhañ un talm uheloc'h eget 20 000 Hz, eleze dreist bevonn ar stenioù klevadus gant mab den. Lies arver zo d'an usstenioù er vezekniezh (usstengurañ, stenwerañ, grouanvreviñ, h.a.).
- ultrasonothérapie** ◇ **ultrasonotherapy** ◇ **usstengurañ** Arver yac'hadel an usstenioù.
- uncarthrose** ◇ **uncarthrosis** ◇ **unkartroz** g. Anafoù artrozel sezet e kenvelloù al livenn c'houzoug (kenvelloù baleg-mellenn), e-doug ar chougartroz.
- unciforme ou uncinée : crise ~** ◇ **uncinate fit (Jackson)** ◇ **barrad g. krogel** Ur furm droukfell ividig naouus dre drezerc'hioù grezvarrek c'hweshael pe dañvael, gwelaled pe glevedel a-wechoù, kevredet gant dianennoù, stadoù lederizhañ hag a-wechoù an anc'hrez, arsellet gant ar yoc'henoù empenn sezet e-kichen krog ar penmarc'hig.
- uncodiscarthrose** ◇ **uncodiscarthrosis** ◇ **unkodiskartroz** g. Kevredet un kartroz hag un diskartroz e-doug remm henek dic'henezhadel al livenn c'houzoug (chougartroz).
- uncus** ◇ **uncus** ◇ **1 krog g. 2 baleg** g. 1 Penn e stumm ur c'hrog an droenn lez-pennmarc'hig. 2 Baleg kornloarek ar mellennoù gouzoug, eus an trede d'ar seizhvet.
- uncusectomie** ◇ **uncusectomy** ◇ **balegezvenañ** Dazbidañ ar baleg mellenn.
- unguéal** ◇ **ungual** ◇ **~(an) ivin, -ivin, ivinel** aa. A-zivout an ivin.
- unicellulaire** ◇ **unicellular** ◇ **unkellig aa., unkelligel** aa. Amparet gant ur gellig hepken.
- unifactoriel** ◇ ◇ **unparennel** aa. O taveiñ d'ur barenn hepken : ur parzhiad, un ampar, e dalc'h un arbenn.
- unilatéral** ◇ **unilateral** ◇ **untu** aa. O tizhout un tu eus ar c'horf pe eus un organ hepken.
- uniloculaire** ◇ **unilocular** ◇ **unlog** aa. Gant ur gavenn pe ul log hepken.
- unipolaire** ◇ **unipolar** ◇ **unvlein** aa. Gant ur blein hepken.
- unisexualité** ◇ **unisexuality** ◇ **unrevegezh** b. Bezoud reol, gant un hinienn, doareennoù korfadurel ha bevedel ur rev hepken.
- unitaire : monstre ~** ◇ **simple monster** ◇ **euzheg g. -eion unat** Euzheg amparet gant elfennoù eus un hinienn hepken.
- unité** ◇ **unit** ◇ **unanenn** b. Braster pe gementad o talvezout da elfenn geñveriañ o kevaraezañ ur muzul.
- unité d'accueil familial thérapeutique** ◇ ◇ **unvez b. degemer familhel yac'hadel** Framm degemer ha herberc'hiañ en ur familh evit ar c'houziviaded stabilaet. Dazeilad evit ar c'hlavdiadur ez eo an amkan anezhañ kevaraezañ kendalc'hegezh an

arouelioù en ur stern familhel evit gouzviaded dic'houest da vevañ o unan, an amkan o vezañ hepkoriñ an emdenn, kevaraezañ ar genfestadelezh hag an adkenempradur, ha hepkoriñ un herberc'hvezh. Roll ar c'hoskor arouelañ zo ambroug ar familhoù dre ur skoazell reoliek.

unité fonctionnelle ◇ **functional unit** ◇ **unvez b. arc'hwelel** Framm elfennel amkanet da ensammañ ar glañvourion gant ur bare arouelañ pe galvezvezege, hennadet diwar-bouez o c'hefridiou hag aozadurioù (sl. *centre hospitalier, service, hôpital*).

unité motrice ◇ **motor unit** ◇ **unvez b. loc'hañ** Teskad ur motoneuron hag ar c'haherwiennoù nervaouet gantañ.


unité pour les malades difficiles ◇ ◇ **unvez b. evit ar glañvourion diaes** Framm bredospitalel e metoù kloz a zegemer ar c'houzviaded ospitaliet a-berzh kefridi, ar glañvourion dezho ur stad arvarus evito o unan pe evit an nesaourion. Ensammet eo an arouelioù klañvidour hervez komenadoù arouelioù rennek, ha diarbennoù dibarek a vez desezet, ken evit surentez ar c'hoskor arouelañ, ken evit gouzviaded all an unvez.

Unna : botte de ~ ◇ **Unna's boot** ◇ **heuz b. Unna** Amlennad o c'hronnañ ar c'har e stumm un heuz, arveret evit prederiadir baleadel an angreizhoù teuc'hellel. Sevenet eo dre rodellañ ur vandenn voñselin intret gant peg Unna (meskad glikerin, gelatin, oksidenn zink ha dour).

Unverricht-Lundborg : maladie ou syndrome d' ~ ◇ **Unverricht's disease, myoclonus epilepsy** ◇ **kleñved b. Unverricht-Lundborg** Droukfell kridek argammedek o kevredih kahegridoù lec'higek, un disleberadur bred argammedek hag arouezioù nerval diseurt. Bez' ez eo un anaez hêrezhel treuzkaset hervez ar mod aotozomek enkilek, o tisoc'h gant ar marv a-benn ur pemzek vloaz bennak. Bez' ez eus un ensiladur strewek eus an darn vrasañ a 'r flugezennoù gant mukopolisakaridoù trenkek (sl. *mucopolysaccharidose* hag *épilepsie généralisée*).

UPDRS ◇ **UPDRS (Unified Parkinson's Disease Rating Scale)** ◇ **UPDRS, skeul b. andalañ unvan kleñved Parkinson (SAUKP)** Skeul andalañ unvan kleñved Parkinson, arveret ar muiañ.

uracile ◇ **uracil** ◇ **urakil g.** Bazenn birimidek parzhiat en amparadur ar molekul RNA.



uraniste ◇ **uranist** ◇ **heñvelreviad g. -ed** (sl. *homosexual*).

uranoplastie ou **uranostéoplastie** ◇ **uranoplasty** ◇ **stavnatelviñ** Oberatadenn unanatelviñ amkanet da zazluniañ ar ouel stavn ha da serriñ an igorennoù ganedigel pe arzeuat a 'r volz.

urano-staphyloplastie ou **urano-staphyloporrahie** ◇ **uranostaphyloplasty** ◇ **stavndlita** Dereizhañ surjaniel dre unanatelviñ ur skarr er stavn askornek hag er ouel stavn.


urate ◇ **urate** ◇ **urat g.** Hal an drenkenn urek.

uratémie ◇ **urataemia** ◇ **gwadurategezh b.** Bezañs uratoù er gwad.

uraturie ◇ **uraturia** ◇ **troazhurategezh b.** Bezañs uratoù en troazh.

Ureaplasma urealyticum ◇ **Ureaplasma urealyticum** ◇ **Ureaplasma urealyticum** Spesad bakteri Gram— gougevret ouzh kerentiad ar *Mycoplasmataceae*, kelanet er forzhioù troazhañ hag en ervez da zevoudañ kantroazhfoioù. Emaint en araez da zour-rannañ an urea, alese o anvad.

uréase ◇ **urease** ◇ **ureaz g.** Enzim o tourrannañ an urea :



o reiñ amoniak ha dioksidenn garbon. Bezant eo e garvevion 'zo, en o zouez *Helicobacter pylori*. — **prouad an ureaz herrek** (Gl. *test rapide à l'uréase*) : kevaraezañ a ra e-doug un eurvezh dinoiñ ar bakteri-se dre lakaat e kendiraez un tamm glaourgenn stomok bevsavet hag ur metoù urea ennañ hag ur merker pH dre liv.

urée ◇ **urea** ◇ **urea b.** Diamid an drenkenn garbonek pe karbamid, a zelun $\text{H}_2\text{N} - \text{CO} - \text{NH}_2$, kediad strinkennek, diliv, o werediñ evel ur vazenn wan. Bezant eo en troazh hag, a gementad bihan, er gwad, er sugenn, el limf, h.a. Bez' ez eus anezhañ ar c'hediad pennañ evit a sell dioulañ an amoniak, furmet e-kerz eznevid an amindrenkennoù. Enaozet eo en avu hogos penn da benn, ha goude bezañ tremenet er gwad, ez eo dioulet dre an troazh.

- urémie** ◇ **uraemia** ◇ **gwadureegezh b.** Bezañs urea er gwad, ezvevennet gant an troazh ent reol. — Termen deuet heñvelster da skorted lounezh lemm. Bez' ez eo teskad an darvoudoù devoudet gant daspugn er gwad an danvezennoù pistriek a vez ezvevennet gant al lounezh ent reol hag azdalc'het e dianlen ur miarc'hwel anezhi. Ur mod echuiñ paot e vez ar wadureegezh eus al lounezhadoù, o tiskouez lies rizh klinikel (furmoù nerver, analadel, kreuzpervezel) (sl. *azotémique* : *syndrome* ~ ha *insuffisance rénale chronique*).
- urémigène** ◇ **uremigenic** ◇ **gwadureien aa.** O tec'h an erzerc'hadoù gwadureel.
- urémique** ◇ **uraemic** ◇ **gwadureel aa.** A-zave d'ar wadureegezh.
- uréogénèse** ◇ **ureogenesis** ◇ **urebarañ** Steudad dazgweredoù o tisoc'h gant enaoz an urea diwar an amoniak.
- urétéral** : **syndrome** ~ ◇ ◇ **azoniad g. sandroazhel** C'hwezhigellostoù troazh sklaer gant ar venev.
- urétéraux** : **points** ~ ◇ ◇ **poentoù l. (g.) sandroazhel** An tri foent sandroazhel a glot gant an teir strishaenn a 'r san droazh ma chom gennet ar grouan ar peurliesañ : poull an dargreiz (steviadur ar geforzh lestr-sandroazh), poull ar glun (tremen ar gwazhied a-glun), an teuta a-lestr (keforzh c'hwezhigell-sandroazh).
- uretère** ◇ **ureter** ◇ **san b. droazh** San stirkaherek kranennek, strizh, daoudañvat, o kas an troazh eus al lounezh d'ar c'hwezhigell, war-dro 27 cm an hed anezhi. Loc'hañ a ra e lestr al lounezh dre ur frankaenn hag echuiñ a ra e parzh adreñv-traoñ ar c'hwezhigell.
- urétérectomie** ◇ **ureterectomy** ◇ **sandroazhezvenañ** Dazbidañ darnel pe hollel ar san droazh.
- urétérite** ◇ **ureteritis** ◇ **sandroazhfo g.** Tanijenn ar san droazh, eilvedel hogos atav pe d'ur poreadur eus ar c'hwezhigell (sandroazhfo askennus), pe d'ul lounezhad (sandroazhfo war ziskenn).
- urétéro-cœcycystoplastie** ◇ **urétérocœcycystoplasty** ◇ **sandroazh-sac'henn-c'hwezhigellateliñ** Oberatadenn surjaniel amkanet da ratreañ ar san droazh hag ar c'hwezhigell, dre arverañ ar sac'henn da zasluniañ ar c'hwezhigell.
- urétérocèle** ◇ **ureterocele** ◇ **sandroazhogad g.** Usvoll kistek lodenn dibenn, e-barzh c'hwezhigell, ar san droazh, e dianlen ur strishadur eus gwask diavaez ar san droazh.
- urétérocolostomie** ◇ **ureterocolostomy** ◇ **dasforzhañ sandroazh-kolon** Pennegiñ surjaniel ar san droazh er c'holon, ent dibarek er c'holon treuz.
- urétéro-cysto-néostomie** ◇ **ureterocystoneostomy** ◇ **nevezforzhañ sandroazh-c'hwezhigell** Adenstedañ ar san droazh er c'hwezhigell, e degouezh a skejadur darvoudel ar san droazh, pe a strishadur anezhi pe c'hoazh a fic'h sandroazh-gouin.
- urétéro-cystoplastie** ◇ **ureterocystoplasty** ◇ **sandroazhc'hwezhigellateliñ** Oberatadenn surjaniel amkanet da ratreañ ar san droazh hag ar c'hwezhigell.
- urétéro-entérostomie** ◇ **ureteroenterostomy** ◇ **dasforzhañ sandroazh-pervez** Oberatadenn surjaniel, anezhi pennegiñ ar san droazh er pervez.
- urétérographie** ◇ **ureterography** ◇ **sandroazhluniñ** Skinluniñ ar san droazh ensinklet enni un danvezenn demer ouzh ar skinoù X.
- urétéro-hydronéphrose** ◇ **ureterohydronephrosis** ◇ **lounezhfoeñv g. gant sandroazhusvoll, uterohidronefroz g.** Lounezhfoeñv rouestlet gant un usvoll eus ar san droazh.
- urétéro-hydrose** ◇ **hydroureter** ◇ **ureterohidroz g.** Usvoll ar san droazh diwar ur skoilh ouzh diver an troazh.
- urétéro-iléoplastie** ◇ ◇ **sandroazhklunegennateliñ** 1 Araezad oberatael amkanet da ratreañ ar san droazh, anezhañ pennegiñ ur san droazh pe an div ouzh ur c'hilbleg pervez dredet ha dasforzhet ouzh ar c'hwezhigell. 2 Heñvester gant *sandroazh-pervezateliñ* (Gl. *urétéro-entéroplastie* : amsaviñ ar san droazh (da skouer, e degouezh usvoll ar san droazh, gant ur c'hilbleg pervez).
- urétéro-lithotomie** ◇ **ureterolithotomy** ◇ **maenezvenañ ar san droazh, sandroazhvaenezvenañ** Digeriñ surjaniel ar san droazh evit eztennañ grouan.
- urétérolyse** ◇ **ureterolysis** ◇ **sandroazhezglenañ** Gwezh surjaniel anezhañ loezañ ar glenelloù o festañ pe oc'h amwaskañ ar san droazh.
- urétéroplastie** ◇ **ureteroplasty** ◇ **sandroazhateliñ** Ratreañ surjaniel ar san droazh, en dibarek evit dereizhañ un isvoll.
- urétéro-pyélolyse** ◇ ◇ **sandroazhlestrezglenañ** Distagañ ar san droazh hag al lestr diouzh ar glenelloù ouzh o gronnañ.
- urétéro-pyélo-néostomie** ◇ **ureteropyeloneostomy** ◇ **nevezforzhañ sandroazh-lestr** Dasforzhañ ar san droazh ouzh lestr al lounezh (e degouezh a isvoll ar san droazh).
- urétéro-rectostomie** ◇ **ureterorectostomy** ◇ **dasforzhañ ar san droazh er youlc'h, dasforzhañ sandroazh-youlc'h, sandroazhyoulc'hdasforzhañ** Skarvañ surjaniel ar san droazh er youlc'h.
- urétérorraphie** ◇ **ureterorrhaphy** ◇ **sandroazhdlita** Dlita ur san droazh skejet pe enbenet.
- urétéro-sigmoïdostomie** ◇ **ureterosigmoidostomy** ◇ **dasforzhañ sandroazh-sigma, sandroazhsigmadasforzhañ** Skarvañ ar san droazh er c'holon sigma.
- urétérostomie** ◇ **ureterostomy** ◇ **sandroazhadforzhañ** Skarvañ surjaniel ar san droazh ouzh ar c'hroc'hen.

urétérotomie ◇ **ureterotomy** ◇ **sandroazhenbenañ** Digeriñ ent surjanel ur san droazh.

urétéro-vésicoplastie ◇ **ureterovesicoplasty** ◇ **sandroazhc’hwezhigellateliñ** Ratreañ ezreolderioù eus ar c’hwezhigell hag eus lodenn izelañ ar san droazh.

urétralgie ◇ **urethralgia** ◇ **kanthroazhost** b. Laur e par ar c’han troazh, hep anaf heverk.

urètre ◇ **urethra** ◇ **kan g. troazh** Kanol lienennek o kas an troazh eus ar c’hwezhigell betek an diavaez, ma tigor dre wask diavaez ar c’han troazh. Gant ar gourev ez emastenn eus gouzoug ar c’hwezhigell betek penn ar c’halc’h, 16 cm hed dezhañ ent keitat gant daou grommadur pa vez ar c’halc’h er stad ankevod, oc’h emrannañ en ul lodenn araok pe heloc’h hag ul lodenn adreñv pe diloc’h. C’hoarvezout a ra a deir lodenn : 1) a-raksavenn, loet war-lerc’h diouzhtu ar c’hwezhigell, en dro dezhi ar raksavenn ha ma tigor ar sanioù strinker hag ar raksavenn, 2) lienennek, loet etre kern ar raksavenn hag ognonenn ar c’horf spoueek, ha 3) spoueek, a dreuz korf spoueek ar c’halc’h hag a zegouezh e gwask diavaez ar c’han troazh. Ouzhpenn an troazh, ar sper a dremen dre san droazh ar gourev. San droazh ar venev zo 4 cm hed, eus gouzoug ar c’hwezhigell betek gwask diavaez ar c’han troazh loet a-us d’ar gouin. Lienennek penn da benn eo e luniadezh.

urétréctomie ◇ **urethrectomy** ◇ **kanthroazhezvenañ** Dazbidañ darnel pe hollel ar c’han troazh.

urétrite ou **urétrhite** ◇ **urethritis** ◇ **kanthroazhfo g.** Tanijenn lemm pe henek ar c’han troazh, diwar garvevion daskenek, *Neisseria gonorrhoeae* (gonokok), *Chlamydia trachomatis*, *Trichomonas vaginalis*, hogen devoudet e vez alies kenan gant ar gonokok (*kanthroazhfo blennorrhagek*) (sl. *col vésical* : *maladie du ~, maladie de Marion*).

urétrite à inclusions ◇ **simple urethritis** ◇ **kanthroazhfo ebarzhennek** Anaez henek revdredizhus diwar *Chlamydia trachomatis*, en ervez da zevoudañ un argellfo gant ar gourev ha, gant ar venev, ur poreadur lestr, en ervez da vezañ un arbenn a c’haonac’hded.

urétrocèle ◇ **urethrocele** ◇ **1 kanthroazhogad g. 2 bogod g. ar c’han troazh, kanthroazhvogod** 1 Gant ar venev, usvoll ar c’han troazh o valirañ er gouin e rezh ur yoc’henn a vent gant ur graoñenn. 2 Heñvelster gant Gl. *diverticule de l’urètre* Sz. *diverticulum of female urethra* : bogod ar c’han troazh, kentañ derez ur c’hwezhigellogad er gouin.

urétrocystite ◇ **urethrocystitis** ◇ **kanthroazhc’hwezhigellfo g.** Tanijenn ar c’han troazh hag ar c’hwezhigell war un dro.

urétrocystographie ◇ **urethrocystography** ◇ **kanthroazhc’hwezhigelluniñ** Skinluniñ ar c’han troazh hag ar c’hwezhigell goude ensinklañ un demeraer.

urétrocystoscopie ◇ **urethrocystoscopy** ◇ **kanthroazhc’hwezhigellengweliñ** Engweliñ ar c’han troazh hag ar c’hwezhigell.

urétrographie ◇ **urethrography** ◇ **kanthroazhluniñ** Skinluniñ ar c’han troazh goude ensinklañ un danvezenn demer ouzh ar skinioù X.

urétroplastie ◇ **urethroplasty** ◇ **kanthroazhateliñ** Asparañ ur c’han troazh nevez diwar-bouez tammoù kroc’hen.

urétrorragie ◇ **urethrorrhagia** ◇ **kanthroazhwadliñvañ** Gwadliñv o tont eus ar c’han troazh.

urétrorrhaphie ◇ **urethrorrhaphy** ◇ **kanthroazhdlita** Krafaelañ ar c’han troazh bet skejet pe enbenet.

urétrorrhée ◇ **urethrorrhoea** ◇ **kanthroazhver g.** Beradur ezreol eus ar c’han troazh.

urétroscopie ◇ **urethroscopy** ◇ **kanthroazhengweliñ** Imbourc’h gweledel ar c’han troazh diwar-bouez un uretroskop.

urétroskénite ◇ ◇ **uretroskenit g.** Tanijenn ar c’han troazh ha gwagrennoù ar c’han troazh.

urétrosténie ◇ **urethrostenosis** ◇ **kanthroazhisvoll g.** Strishadur padek pe dibad ar c’han troazh, diwar vezañs ur c’hist, pe ur yoc’henn pe ivez diwar un orin daraezel. Pa vez klok an isvoll e ranker gwezhiañ diwar zifrae, gant, diouzh ret, ur c’hwezhigelladforzhañ pe ur c’hanthroazhezforzhañ ouzh ar c’hroc’hen, war-benn kevaraezañ diver reol an troazh.

urétrostomie ◇ **urethrostomy** ◇ **kanthroazhezforzhañ** Skarvañ surjanel ar c’han troazh ouzh ar c’hroc’hen.

urétrotomie ◇ **urethrotomy** ◇ **kanthroazhenbenañ** Flañchañ ar c’han troazh war-benn adsavelañ diver an troazh. — **kanthroazhenbenañ diavaez** (Gl. *u. externe* Sz. *external u.*) : flañchañ ar c’han troazh eus an diavaez war-du an diabarzh. — **kanthroazhenbenañ diabarzh** (Gl. *u. interne* Sz. *internal u.*) : flañchañ ar c’han troazh eus an diabarzh war-du an diavaez, diwar-bouez ur benveg arbennik, an uretrotom.

urgences : **structures d’~** ◇ ◇ **framm g. trummadoù** Elfenn ur reizhiad trevnet e rouedad (ospitalel hag emaez-ospitalel).

urgentiste ◇ ◇ **trummadour g.** Mezeg an trummadoù, arbennigour an drummadouriezh.

uricémie ◇ **uricaemia** ◇ **gwadvec’h g. trenkenn urek, urekwadvec’h g.** Feur an drenkenn urek er gwad, ent reol eus 0,02 da 0,04 g/L gwad klok.

Gwerzhadoù reol bec’h an drenkenn urek er gwad

Gouzrec’hioù	mg /L	μmol /L
Bugale	20-50	120-300
Beneved	20-60	120-360
Goureved	30-70	180-420

- uricofrénateur** ◇ ◇ **1 urekgevennus aa., urekgevenner aa. 2 urekgevenner g. -ioù** 1 En araez da heudañ enaozerezh trenkenn urek er bevedeg. 2 Gwezher urekgevenner, arveret da brederiañ an urloù, evel da skouer an *allopurinol* a skoilh ar ksantinn oksidaz, enzim diziouerus da enaozañ an drenkenn urek.
- uricolyse** ◇ **uricolysis** ◇ **urekloezañ** Distrujañ an drenkenn urek er bevedeg.
- uricopexie** ◇ **uricopexy** ◇ **ureklenañ** Lenañ trenkenn urek er gwiadoù e rezh koc'hionadoù (urloù) pe e rezh grouan el lounezh (grouanegezh urek).
- uricurie** ◇ **uricosuria** ◇ **urektraozhañ, urektraozh g.** Ezvevennañ an drenkenn urek gant an troazh.
- uridine** ◇ **uridine** ◇ **uridin g.** Ribozid (nukleozid ar riboz) an urakil, kedrann an drenkenn dezoksiribonukleek.
- urinaire** ◇ **urinary** ◇ **1 troazhel aa. 2 troazhadel aa., ~troazhañ, troazhañ-** 1 A-zave d'an troazh, da skouer : *poroad troazhel, traezh troazhel*. 2 A-zave d'ar bevegad troazhañ ha, da heul, d'an troazh, da skouer : *pugnez troazhadel, yoc'henn droazhadel, dilouezer troazhadel*.
- urinaire : crise** ~ ◇ **urocrisis** ◇ **gwaskad g. troazhel** 1 Barrad laurioù c'hwezhegell ha kan troazh gant an dabezeion. Tu zo ivez d'ober gant *troazhenn* pe termenou skeudennel evel *struilhad troazh, diloc'h troazh*. 2 Ustroazh rust o tarvezout e dibenn kleñvedoù 'zo (skeventfo, da skouer).
- urinal** ◇ **urinal** ◇ **lestr g. troazhañ, troazhlestr** Lestr a dalvez da zastum troazh un den gweleat.
- urine** ◇ **urine** ◇ **troazh g.** Liñvenn borc'het gant al lounezh, dastumet gant ar c'hwezhegell kent bezañ karzhet er-maez.
- urines : division des** ~ ◇ ◇ **dispartiañ an troazhioù** Dispartiañ troazh al lounezh dehou diouzh hini al lounezh kleiz, dewerc'het diwar-bouez ur c'hateteriñ sandroazhel daoudu, e sell da geñveriañ talvoudegezh arc'hwelel an div lounezh.
- urines à odeur de houblon : maladie des** ~ ◇ **congenital hydroxybutyric aciduria** ◇ **troazhtrenkegezh b. hidroksibutirek ganedigel, kleñved g. an troazh c'hwezh an houpez** Kleñved enzimateg ganedigel naous dre un empennaoued gant un dilerc'h bredloc'hadel muiet hag istant kaherel. An troazh zo ennañ trenkenn hidroksibutirek, o reiñ ur c'hwezh heñvel ouzh hini an houpez. Nes e hañval bezañ ar c'hleñved-se ouzh al leukinoz (sl. *leucinoze, maladie du sirop d'érable*).
- urineux** ◇ **urinous** ◇ **1 troazhel aa. 2 troazhadel aa., ~troazhañ, troazhañ- 3 troazhek aa.** 1 ha 2 : sl. *urinaire*. 3 Oc'h enderc'hel troazh pe, gant c'hwezh, neuz an troazh.
- urinome** ◇ **urinoma** ◇ **urinom g.** Kist ennañ troazh diwar ur fuadur diandaraez e par lestr al lounezh pe ar san droazh.
- urinotorax** ◇ **urinotorax** ◇ **brusktraozhad g.** Fennad troazh e kavenn ar c'hrezoù.
- urique : acide** ~ ◇ **uric acid** ◇ **trenkenn b. urek** Elfenn disoc'hel eznevid ar purinoù hag an trenkennoù nukleek. An hogennadur anezhi er gwiadoù hag el liñvennoù bevedel a vez arsellet en urloù.
- urobiline** ◇ **urobilin** ◇ **urobilin g.** Livegenn anlun melenruz disoc'h direadur ar bilirubin, a gaver ent reol er pervez hag ivez a gementad bihan en troazh.
- urobilinogène** ◇ **urobilinogen** ◇ **urobilinogen g.** Danvezenn diliv, disoc'h direadur er pervez, gant ar bakteri, eus ar bilirubin keveilet, ezvorc'het gant ar vestil. Ezvevennet eo a gementadoù bras kenan gant an oulennoù, an oksidañ anezhañ o reiñ dezho o liv. Ul lodenn vihan, dassuget gant ar pervez, oksidet en urobilin, zo ezvevennet ent reol en troazh ouzh e livañ.
- urobilinurie** ◇ **urobilinuria** ◇ **urobilindroazhvec'h g.** Bezañs pe feur urobilin en troazh. Reñverek e vez e-doug kleñvedoù terzhiennek 'zo hag an avuadoù.
- urocèle** ◇ **urocele** ◇ **troazhvozhell b.** Yoc'henn diwar ensiladur troazh er gousac'h.
- uroculture** ◇ **urine culture** ◇ **troazhtiñvañ** Tiñvañ garvevion diwar troazh erlamet ent anlestel.
- urocytogramme** ◇ **urocytogram** ◇ **troazhrestrad g.** Disoc'h imboure'h korrgreskerel elfennoù kelligel an troazh, dastumet dre c'houzediñ pe dronizhañ (gouzed an troazh).
- urodilatine** ◇ **urodilatin** ◇ **urodilatin g.** Amindrenkenn borc'het gant al lounezh, dezhi an un gwered lec'hel hag ar barenn natriomdroasheiat kentezel, a zo nes al luniad anezhi.
- urodynamique** ◇ **urodynamics** ◇ **1 troazhloc'honiezh b. 2 troazhloc'honiell aa.** 1 Studi ar gwaskoù c'hwezhegell ha kan troazh, ha kas an troazh ivez, e-doug an dezioulañ, amkanet da imboure'hiñ miarc'hwelioù ar c'hwezhegell. 2 A-zave da amveziadoù loc'honiell an dezioulañ : gwask, kas, ec'honad, galloudezh hag ec'honad ar flistrad,
- urodynie** ◇ **urodynia** ◇ **urodiniezh b.** Laur o tezioulañ.
- urogastrone** ◇ **urogastrone** ◇ **urogastron g.** Polipeptid douhennet eus an troazh, al luniad anezhañ o vezañ nes kenan da hini ar barenn greskiñ epidermel, en araez da heudañ borc'hadur HCl gant ar stomok.
- urographie intraveineuse** ◇ **intravenous urography** ◇ **troazhluniñ engwazhiennel** Skinluniñ ar benvegad troazhañ goude ensinklañ engwazhiennel un danvezenn demer ouzh ar skinoù X ezvevennet dre al lounezh.
- urokinase** ◇ **urokinase** ◇ **urokinaz g.** Enzim o vlivaat ar fibrinloezañ, bezant en troazh denel, dedalvezet er c'haouledloezañ, ent dibarek en enfrou skevent bloc'hek.
- uroolithiase** ◇ **uroolithiasis** ◇ **grouanegezh b. troazhel, troazhc'hrouanegezh** Bezañs grouan er forzhioù troazhañ.

- urologie** ◇ **urology** ◇ **troazhadouriezh** b. Diskiblezh o plediñ gant ar benvegad troazhañ hag ivez, dre astenn ster, gant ar benvegad troazhganadel, gant ar gourev.
- uromèle** ◇ **uromelus** ◇ **uromel** g. Krouell euzhek kedezelek gant an daou ezel traoñ kempeget hag un troad hepken en dibenn.
- uromètre** ◇ **urometer** ◇ **urometr** g., **troazhdouesventer** g. Ardivink a dalvez da savelañ douester an troazh.
- uromoduline** ◇ **uromodulin** ◇ **uromodulin** g. Glikoprotein andileizh borc'het ent bonan gant al lounezh e par ar bibell bellek ha kizenn Henle. Ur dargenad er c'henenn anezhañ zo bet arsellet el lounezhad urekwadusvec'hiek familhel yaouerel ha kleñved kistel ar vezonenn lounezh.
- uropathie** ◇ **uropathy** ◇ **troazhanaez** g. Nep anaez ar benvegad troazhañ.
- uropéritoine** ◇ ◇ **ampellenndroazhad** g. Fennad troazh e kavenn an ampeleñn.
- uropoïèse, fonction uropoïétique** ◇ **uropoiesis** ◇ **troazhparañ** Furmiñ an troazh.
- urostomie** ◇ **urostomy** ◇ **troazhezforzhañ** Skarvañ ur forzh troazh ouzh ar c'hroc'hen, ur c'*hanthroazhezforzhañ* ar peurliesañ.
- urothélium** ◇ **urothelium** ◇ **urotelienn** b. Epitelienn o pallennañ ar forzhioù troazhañ.
- urticaire** ◇ **urticaria** ◇ **linadell** b. Anaez kroc'hen naouus dre zinodadur krugennoù arwenn pe arruz, distabil, heñvel ouzh flemmadennoù linad, kevredet gant un debren ha gant santadoù a loskadurezh pe pikadurezh. An dispuilhad a c'hell bezañ lec'hiek pe hollek. Emañ ar c'hrukennoù en ervez da zaskantañ e plakennoù. Un erzerc'had eus an dreistkizidigezh kentizhek eo. — **linadell lemm** (Gl. *u. aiguë* Sz. *acute* u.) : dinodadur lemm a grugennoù linadell, herrek kenan an atreñ anezho. — **linadell henek** (Gl. *u. chronique* Sz. *chronic* u.) : linadell oc'h adfeilhañ e-pad meur a viz. — **linadell yenion** (Gl. *u. au froid* Sz. *cold* u.) : linadell devoudet gant ar yenion war an tachennoù dizolo. — **linadell golinwerc'her** (Gl. *u. cholinergique* Sz. *cholinergic* u.) : krugennoù bihan poentek debrenus kenan o tinodiñ dre wered ar c'hweziñ, ar wrez pe an nervernegezh, o tevoudañ un dilaosk aketilkolin gant ar mastokit. — **linadell vanat** (Gl. *u. factice* Sz. *factitious* u.) : krugennoù o tinodiñ goude rimiañ ar c'hroc'hen — **linadell heolel** (Gl. *u. solaire* Sz. *solar* u.) : o tinodiñ war ar c'hroc'hen hep gwarez damc'houde an ardizh ouzh an heol — **linadell livegat** (Gl. *u. pigmentaire* Sz. *u. pigmentosa*) : paotañ furm erzerc'hadou kroc'hen mastokitoz (sl. *mastocytose*) — **linadell livegennek** (Gl. *u. pigmentée* Sz. *purpura urticans*) : seurtad linadell dibaot kenan naouus dre un dispuilhad gwadliñvek o lezel war e lec'h brizhennoù balirek pe arblat, azgell, o trebadout pell amzer — **linadell wadliñvel** (Gl. *u. hémorragique* Sz. *u. haemorrhagica*) : seurtad linadell oc'h erzerc'hañ ar peurliesañ goude kemeradur ul lia (kloramfenikol, sulfamid, kinin, fenilbutazon, amidopirin). A-daol trumm e tinod krugennoù damroz, gouliñvek ha debronek oc'h emledañ hag o taskantañ, kevredet gant purpura hag alies gant un derzhienn uhel hag arzostoù. An holl azonou-se a steuz goude paouez ar prederiadur a oa an arbenn anezho.
- urticarme** ◇ ◇ **linadellegezh** b. Tuadur darwazhus kroc'hen an tachadoù aloubet gant ur barrad linadell da zec'han elfennoù nevez dindan delanvad un hegadur skañv.
- urtication** ◇ **urtication** ◇ **1 linadañ 2 linadellañ** 1 Skourjezañ gant un duilhad linad fresk da gaout ur ruziadur. 2 Santad leteñvel ouzh an hini graet gant al linad.
- Usher** : **syndrome d'~** ◇ **Usher's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Usher** Anaez hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek oc'h erzerc'hañ gant ar bugel yaouank. Naouiñ a ra dre gevredet un dic'henezhadur eus livegenn al luc'hsae — o tevoudañ ul leiadur eus al lammedd weled, un disleberad eus ar gwelvaez ha bouc'hwel amheol — gant ur bouzarder dec'havael daoudu ha kemparzhkek, kevret gant muderezh.
- uta du Pérou** ◇ **uta** ◇ **uta** b. ar **Perou** Furm angreizhek al leichmanioz amerikan devoudet gant *Leishmania peruviana*, naouus dre anafoù fri ha genoù diseurt.
- utérin** ◇ **uterine** ◇ **1 ~ar grozh, a-grozh, krozh-, -krozh, krozhel** aa. **2 diavamm** aa. 1 A-zave d'ar grozh. 2 A-zivout ar vreudeur hag ar c'hoarezed ganet gant an un mamm, ket gant an un tad avat.
- utérus** ◇ **uterus** ◇ **krozh** b., **mammog** g. Organ genel benevel amkanet da zegemer ar vigellig frouezhiget, da gevaraezañ an diorreadur anezhi ha d'he ezvoutañ e dibenn ar vec'hiegi. Ur organ kaherek eo, kleuz, a 7 da 8 cm hed, o c'hoarvezout eus ur parzh krec'h ledan, ar c'horf, hag ur parzh traoñ strishoc'h, ar gouzoug ; rann uhelañ ha ledanañ ar c'horf a vez graet *deun ar mammog* anezhi. Kavenn ar grozh a zifourc'her gouin dre ar gouzoug hag e korzennoù ar grozh dre parzhioù krec'h ha kostezel an deun (kornioù ar grozh). Loet eo ar grozh el lestr bihan, etre ar c'hwezhiell hag ar youlc'h. Ouzhpenn levrgenn an ampeleñn a zo ouzh he c'holeiñ evit un darn vras, c'hoarvezout a ra eus ur gwiskad kaher a wiennoù levn oc'h amparañ teir haenad dezho durc'hadurioù diseurt, eus ur gwiskad diabarzh glaourek outañ lies gwagrenn hag un epitelienn a gelligoù kengerek dezho blevanioù krenat. Emañ skourret el lestr dre ar stagelloù ledan, ront hag ar pleg youlc'h-krozh.
- uterus acollis** ◇ **uterus acollis** ◇ **krozh dic'houzoug** Krozh gant ur gouzoug astalet an diorreadur klok anezhañ.
- uterus bicornis** ◇ **uterus bicornis** ◇ **krozh daougorn** Kammneuziad o c'hoarvezout a vezañs daou gorf krozh distag o kejañ en traoñ en ur strizh hag ur gouzoug unel.
- uterus biforis** ◇ **uterus biforis** ◇ **krozh daoudoull** Kammneuziad a'r grozh o c'hoarvezout eus ur gavenn gorf ha div gavenn c'houzoug.
- uterus bilocularis** ◇ **uterus bilocularis** ◇ **krozh divlog** Daouelezh krozh dianat a-ziavaez, anezhi rannadur ar gavenn e div log diwar-bouez un dilhenn a-saezh, evel aspadenn eus he orin daouel (kanolioù Müller).
- uterus deficiens** ◇ ◇ **ankrozh** g. Ezvezañs hollek a-c'hanedigezh a'r grozh.

- utérus didelphe** ◇ **didelphic uterus** ◇ **krozh diskalfet** Seurtad klokañ eus an daouelezh krozh : div hantergrozh dispartiet ha distag gant daou gorf ha daou c'houzoug o tifourkañ en ur gouin unel pe dilhennek. Pa vez damarun an daou c'houzoug e komzer a *grozh damziskalfet*.
- uterus duplex** ◇ **duplex uterus** ◇ **krozh daouel** Termen rumm evit an holl seurtadoù ha derezioù eus an daouelezh krozh.
- utérus gravide** ◇ **krozh bec'hiek** Krozh enni ur rizhell pe ur grouell.
- uterus parvicollis** ◇ **uterus parvicollis** ◇ **krozh garc'houzoug** Krozh gant ur rann c'houzoug bihan kenan, gant ur c'horf a vent reol avat.
- uterus-pied-main : syndrome** ~ ◇ ◇ **azoniad g. krozh-troad-dorn** Kevreted dibaot hêrezhel iswe, kammneuziad daouarn ha treid ha krozh daouel.
- uterus subseptus** ◇ **uterus subseptus** ◇ **krozh darndilhennek** Kammneuziad ar grozh a zo tilhennek en he darn uhelañ (aspadenn daou ganol Müller).
- uterus unicollis** ◇ **uterus bicornis unicollis** ◇ **krozh ungouzoug** Seurtad krozh daouel ma ne angorzh an dilhenn nemet korf an organ ; unel eo ar gouzoug. An ezreolder-se a van andeznaou ar peurliesañ.
- uterus unicornis** ◇ **uterus unicornis** ◇ **krozh unkorn** Krozh direet d'un hantergrozh diwar isteñv unan eus kanolioù Müller.
- utricule** ◇ **utricule** ◇ **krozhig b.** Parzh bazhoulek lec'hiet e lodenn grec'h milendall lienennek ar skouarn diabarzh, ma tifourk an teir san hantergela'hiek.
- utricule prostatique** ◇ **prostatic utricule** ◇ **krozhig ar raksavenn** Bogod undañvat ha kreizer eus lodenn a-raksavenn ar c'han troazh loet en dolbezenn grenn hag o tifourkañ e kreiz turumell ar sper.
- uvéite** ◇ **uveitis** ◇ **gwazhiedsaefo g.** Tanijenn ar wazhiedsae, lienenn al lagad, o c'hoarvezout eus ar ganevedenn, korf ar saeoù hag an dolgennsae.
- uvéoparotidite** ◇ **uveoparotiditis** ◇ **gwazhiedkilvoc'hennfo g.** Tanijenn ar wazhiedsae hag ar gwagrennoù kilvoc'h (kilvoc'hennoù) (sl. *Heerfordt : syndrome de* ~).
- uviol** ◇ **uviol** ◇ **uviol g.** Gwer andemer d'ar skinoù dreistmouk, dezho un trohed gavaelet etre 290 ha 400 nm.
- uviothérapie** ◇ **ultraviolet rays therapy** ◇ **dreistmoukkurañ** Arver yac'hadel ar skinoù dreistmouk.
- uvulaire** ◇ **uvular** ◇ **1 flipezennel aa. hugennel aa.** 1 A-zave da flipezenn greiz ar preñv ilpenn. A-zave d'an hugenn.
- uvulectomie** ◇ **uvulectomy** ◇ **hugennezvenañ** Dazbidañ hugenn ar gouel stavn.
- uvulite** ◇ **uvulitis** ◇ **hugennfo g.** Tanijenn an hugenn.
- uvulotomie** ◇ **uvulotomy** ◇ **hugennenbenañ** Skekañ surjaniel pe gouvenañ darnel pe hollel an hugenn.

V

V ♦ **V** ♦ **V** 1 Arouez ar *volt*. Arouez ar vanadium.

V-test ♦ ♦ **prouad g. V** Araezad hennadiñ ar c'helanoù soliet war skinimbourc'h, a-letu, an dibr turkek.

vaccin ♦ **vaccine** ♦ **vaksin g.** Danvezenn dezhi ar perzh da hangaeañ ar bevedeg enep ur pore. Danzeet e vez pe diwar c'harvevion lazhet pe ezniñvet, pe diwar c'harvevion bev, blinaet avat (gant ar formol, pe ar wrez, da skouer), pe diwar ur rann antigen eus ur garvev. An kez danvezenn, deuet da vezañ ananial, a gevaraez, p'he deus miret he ferzhioù antigen, lakaat ar bevedeg da ziorren un erwezh hangaeel gwarezus.

NOTENN* : Da geñver ar c'hleñved *covid-19* ez eus bet degaset en nevid gwezherioù anvet “vaksinou”, hep bezañ entalet en despizadur amañ diaraok. Adalek ar bloaz 2021 eo bet daskemmet an despizadur evel henn⁵ : “Angevezh diounezet (evel dre ensinklañ) evit fraouaat erwezh hangaeel ar c'horf enep ur gwezher pore pe ur c'hleñved spesadel”. sl. ivez **immunisation**, **vaccination**.

vaccin anti-amaril ♦ **yellow fever vaccine** ♦ **vaksin enebamaril** Vaksin enep an derzhienn velen danzeet diwar viruzoù blinaet diwar-bouez lies tremen war diñvadurioù gwialed. Diounezet eo dre un ensinklad endan-groc'hen unel. Hirbad eo an hangae gounezet : eus 6 da 9 bloavezh.

vaccin anticholérique ♦ **cholera vaccine** ♦ **vaksin enepkolera** Vaksin prientet diwar vibrioù kolerek lazhet. An hangae ne bad nemet 6 mizvezh hag evit war-dro 50 % eus an degouezhioù. Gougemerusted hag efedusted an kez vaksin o vezañ diglok, ez eo bet lamet eus an nevid e 1997 e Frañs.

vaccin anticoquelucheux ♦ **pertussis vaccine** ♦ **vaksin enepdrev** Vaksin ezniñvet amsunet prientet diwar vakteri blinaet (*Bordetella pertussis*), diounezet dre hent dangroc'heneel pe enkaherel, ar peurliesañ kevredet (DT-COQ, da skouer). Bukañ a reer vaksinou nevez gougemeret gwelloc'h, diwar gedrannoù antigenek seurtanvet ankelligel.

vaccin antidiphthérique ♦ **diphtheria anatoxin** ♦ **vaksin enepdifterek** Vaksin prientet diwar doksin difterek dre azdodiñ ur c'hementad savelet a formol ha tommañ (anatoksin difterek, kollet gantañ e bistrigezh ha miret e berzhioù antigenek). Diounezet e vez ent dangroc'heneel pe ent enkaherel, kevredet ar peurliesañ.

vaccin anti-encéphalite à tiques ♦ ♦ **vaksin enep an empennfo diwar darlask, vaksin enebempennfo diardarlask** Vaksin diwar viruz ezniñvet diounezet dre deir ensinkladenn dangroc'heneel.

vaccin antigrippal ♦ **influenza vaccine** ♦ **vaksin enepgrip** Vaksin ezniñvet prientet diwar diñvadurioù viruz ar grip war vi yar rizhellek. Bep bloaz e vez daskemmet evit engwerc'hañ argemmoù ar viruz.

vaccin antihæmophilus ♦ **Haemophilus influenzae type b conjugate vaccine** ♦ **vaksin enephaemofilus** Vaksin ampartet gant polisakaridoù uzenn *Haemophilus influenzae b*. War-benn bezañ hangaeiat kentrat e rank an kez vaksin bezañ kevredet gant ur vaksin all (enepdifterek, enepetanek pe enepmeningokok).

vaccin anti-hépatite A ♦ **hepatitis A vaccine** ♦ **vaksin enebavufo A** Vaksin diwar viruz askevosodet erbedet d'an holl c'houzrec'hioù en ardizh ur riskl uhel a vezañ tredizhet (milourion staelet tramor, ar veajourion e toleadoù broereuziadek meurbet ha strolloù micherel 'zo, evel ar c'hoskor ospital pe hini an embregerezhioù boued). Diounezet e vez ent enkaherel.

vaccin anti-hépatite B ♦ **hepatitis B vaccine** ♦ **vaksin enebavufo B** Vaksin diwar viruz askevosodet diounezadus dre an hent enkaherel, dewerc'het dre enaozañ hilourel, oc'h enderc'hel protein goloenn ar viruz AgHBS. Erbedet evit ar poblañsoù war riskl d'ur pore, emañ ret evit ar c'hoskorioù yec'hed en ardizh.

vaccin antileptospire ♦ **leptospire vaccine** ♦ **vaksin enep leptospir** Vaksin ensinkladus ent dangroc'heneel, ennañ leptospir lazhet eus ar stroll serotipoù *icterohaemorrhagiae*. Amberzet eo evit izili ar micherioù en ardizh (sl. **leptospirose ictérohémmorragique**).

⁵<https://www.merriam-webster.com/dictionary/vaccine> : a preparation that is administered (as by injection) to stimulate the body's immune response against a specific infectious agent or disease

vaccin antiméningococcique ◇ **meningococcal vaccine** ◇ **vaksin enepmeningokok** Vaksin diwar rannoù antigenel bakteri poliozidek o klotañ gant ar strolloù serotipoù A ha C eus *Neisseria meningitidis*.

vaccin anti-ourlien ◇ **mumps vaccine** ◇ **vaksin enepjotorell** Vaksin bev distavet prientet diwar dinvañ *Myxovirus parotiditis* war gennenn gorioallantoidel ar vi yar, diounezet dre an hent dangroc'henele pe enkaherel, hep ken tra pe kevredele.

vaccin antipapillomavirus ◇ **human papillomavirus vaccine** ◇ **vaksin eneppapillomaviruz** Vaksin erguradel daouwerch'h (genotipoù HPV 16, 18) pe pevargerch'h (HPV 6, 11, 16, 18) amparet gant gaourannoù viruzel dewerc'het dre enaozañ hilourel diwar ar broteine muiiek a'r c'hapsid L1. Diounezet e vez ent kaherel e tri doead etrezo entremezioù 0, 2 ha 6 mizvezh gant ar plac'h yaouank kent nep diastok revel (ha gant ar paotr yaouank adalek genver 2021).

vaccin antipneumococcique ◇ **pneumococcal vaccine** ◇ **vaksin enepneumokok** Vaksin ennañ douhennadoù poliozidek o klotañ ouzh 23 serotip eus *Streptococcus pneumoniae*. Amberzet e vez d'ar gouzrec'hioù en ardizh ar poreoù diwar pneumokok (felc'hezvenidi ha drepanokitozeion).

vaccin antipoliomyélique ◇ **poliomyelitis vaccine** ◇ **vaksin eneplouetvelfo** Vaksin prientet diwar skodoù anialek viruz al louetvelfo, ezniñvet diwar-bouez ar formol (vaksin Salk) pe diwar-bouez ar propiolakton formolet (vaksin Lépine), diounezet dre ensinklan endan-groc'hen; pe c'hoazh, vaksin prientet diwar skodoù viruz blinaet dre lies tremen war grigneret pe diñverezh gwiadoù (vaksin Sabin-Koprowski), diounezet dre ar genoù.

vaccin antirabique ◇ **rabies vaccine** ◇ **vaksin enepkonnar** Vaksin viruzel ezniñvet, prientet bremañ war diñvadurioù kelligoù denel pe loenel. Diounezet e vez pe ent erguradel, pe ent kuradel war-lerc'h un diastok gant ul loen dindan c'housesell pe tizhet gant ar gonnar.

vaccin antirougeoleux ou antimorbilleux ◇ **measles vaccine** ◇ **vaksin enepruzell** Vaksin prientet dre vlinaat viruz ar ruzell dre diñvañ war gelligoù denel, ha goude war gelligoù yar ha diounezet ent dangroc'henele. Amparet eo an hangae un dek devezh bennak goude ar vaksinadur.

vaccin antirubéoleux ◇ **rubella vaccine** ◇ **vaksin enepruzig** Vaksin prientet diwar skodoù blinaet eus viruz ar ruzig o tebarañ un hangae padek enep ar ruzig.

vaccin antitétanique ◇ **tetanus anatoxin** ◇ **vaksin eneptetanoz** Vaksin prientet diwar an toksin tetanek dre azdodiñ formol ha chom e-pad ur mizvezh en tesaer (anatoksin tetanek).

vaccin antityphoïdique ou antityphoparatyphique ◇ **typhoid vaccine, typhoparatyphoid vaccine** ◇ **vaksin enep-tifoid** Ar vaksin kozh (TAB) a oa ur vaksin diwar vakteri ezniñvet klok, o kevredeñ *Salmonella typhi* ha *Salmonella paratyphi* A ha B. Ensinklet endangroc'hen e oa dister ar gougemer anezhañ. Adalek 1989 eo bet amsavet gant ar *Typhim Vi* eus ar Bonsav Mérieux, prientet diwar antigen Vi poliozidek puraet uzennoù eus *Salmonella typhi* ha diounezet en ur ensinkladenn dangroc'henele pe enkaherel hepken. An kez vaksindur, nad eo ket mui ret e Frañs, zo amberzet da strollelezhioù en ardizh, en o zouez ar c'hoskor milourel.

vaccin antivarielleux ◇ **varicella vaccine** ◇ **vaksin enepbrec'hniñ** Vaksin bev distavet amberzet d'ar vugale leukemek ha hangaeastalet.

vaccin polyvalent ◇ **polyvalent vaccine** ◇ **vaksin liesgerch'h(ek)** Vaksin prientet diwar lies spesad gercheion ha, dre se, efedus ouzh daskenad ar c'hleñvedoù devoudet gant an holl hadennoù-se.

vaccin sensibilisé ◇ **sensitized vaccine** ◇ **vaksin kizidikaet** Vaksin amparet gant gercheion bet lakaet e diastok gwadvez ul loen hangaet outo, eleze ennañ an antikorfoù spesadel anezho.

vaccinal ◇ **vaccinal** ◇ **vaksinel** aa. A-zave d'ur vaksin, da skouer *viruz vaksinel*.

vaccination ◇ **vaccination** ◇ **1 buvrec'hiñ 2 vaksinañ** 1 Orin ar vaksinadur zo enkoradur ar vuvrec'h evel araez dizarbenn ar vrec'h (sl. *vaccine*). 2 Diounit ur vaksin dre euvriñ, trewanañ pe skarigañ, en amkan da zanken un hangaeñ oberiat ha dre se dizarbenn ur pore.

NOTENN* : Daskemmet eo bet an despizadur e 2021 evel henn : “Diounit ur vaksin en amkan da zanken ur gwarez enep ur c'hleñved spesadel.”

vaccination associée ◇ **combined vaccination** ◇ **vaksinañ kevredele** Arver un pe lies vaksin gerchevel hag un pe lies anatoksin. En doare-se e c'houneder un hangae diaser enep lies pore, gant ar splet muiaat gerch'h an hangaeadurioù eneptoksin debaret gant ar vaksinañ kevredele.

vaccination toxinique ◇ **vaksinañ toksinel** Vaksinañ diwar-bouez toksinoù. Arver toksinoù skignus andaskemmet o vezañ arvarus bras ez eus bet dedalvezet da gentañ meskadoù toksin ha gwadvez eneptoksin; hiziv an deiz e reer gant anatoksin hepken.

vaccine ◇ **1 cowpox 2 vaccinia** ◇ **1 buvrec'h b. 2 brec'hadur g.** 1 Pore ar bovideged (Sz. *cowpox*) hag an ekuideged (Br. *epvrec'h Sz. horsepox*) a zo ar viruz kiriek anezhañ eus kerentiad ar *Poxiviridae*, heñvel ouzh hini ar vrec'h, tiñvet en imboure'hva war-benn prientiñ ur vaksin araezus da hangaeñ an den ouzh an anaez-se (*vaksin enepbrec'h*). 2 Teskad an erzerch'hadoù klinikel arsellet gant an den war-lerc'h enkoradur ar vaksin enepbrec'h, eleze ar *vrec'hidigezh* ent strizh. Ar yezh hengounel a ra ivez gant *lakaet ar vrec'h*, o naouiñ dre un dispuilhad burbuennoù, lec'hiet ar peurliesañ er poent enkorañ ha lavaret e veze *goret eo ar vrec'h*.

vacciniforme ◇ **vacciniform** ◇ **vaksinvanek** aa., **brec'hvanek** aa. Heñvel ouzh ar vuvrec'h pe ar vrec'h.

vaccinoïde ou **vaccinelle** ◇ **vaccinoid** ◇ **gaourec'h** b. Erwezh kroc'hen kuñv gant ur gouzrec'h advaksinnet enep ar vrec'h. Darbenn a reer ar peurliesañ e vez kevatal an hangae debaret gant ar c'haourec'h d'an hini debaret gant ar vaksin enepvrec'h gwirion.

vaccinologie ◇ **vaccinology** ◇ **vaksinouriezh** b. Rann ar vezekniezh o plediñ gant ar vaksinoù.

vaccinostyle ◇ **vaccinostyle** ◇ **araskell** b. Lañsetez vihan e stumm ur bluenn vetal arveret evit vaksiñ dre araskañ.

vaccinothérapie ◇ **vaccinotherapy** ◇ **vaksingurañ** Arver yac'hadel ar vaksinoù, e sell da gurañ pe da ergurañ ur c'hleñved erzerc'h.

VACTERL, VATER : syndromes ~ ◇ **VATER, VACTERL syndrome** ◇ **azoniadoù** l. (g.) **VATER, VACTERL** VATER zo ur gwreskanv o klotañ a-getep ouzh an ezreolderioù da heul :

- V : Sz. *vertebral defect*, kudennoù kammneuziadoù mellennoù, dreist holl soutadur mellennoù 'zo ha kemmneuziad mellennoù 'zo a 'r groazell;
- A : Sz. *anal atresia*, anvoll ar fraezh, o rekizañ an arver eus ar surjianerezh adalek ar c'hanedigezh. Ezreolderioù hag a-wechoù kudennoù fraezhel ar youlc'h; -
- T, R : Sz. *TracheoEsophageal fistula*, fic'h briant-treizher : gant ar bugel ez eus, da-geñver ar c'hanedigezh, strafuilhoù analadel a-zalc'h gant ur migeht etre an treizher hag ar vriant. Ezvezant eo an treizher a-wechoù ;
- R : Sz. *kidney and/or radial anomalies*, kammneuziadoù al lounezhi ha/pe ar werzhid.

A-wechoù e kaver an kez azoniad kevredet gant kammneuziadoù ar galon (ent dibarek ur c'hehentañ etre-kofigoù, pe un ezreolder trapig) hag an izili (kammneuziad ar meud, an daouarn pe an treid); alese ar gwreskanv VACTERL, C evit Sz. *cardiovascular anomalies* Br. *ezreolderioù kalongwazhiedel* ha L evit Sz. *limbs* Br. *izili*.

vacuole ◇ **vacuole** ◇ **vakuol** s. -enn Ec'honnenn gloz, kavenn, bezant e kitoplasm ur gellig pe ur bevedeg unkelligel, en ervez da enderc'hel danvezennou diseurt.

vacuolisation ◇ **vacuolization** ◇ **vakuolekaat** Furmidigezh vakuol.

va-et-vient : bruit de ~ ◇ **to-and-fro sound** ◇ **trouz g. mont-dont** Trouz a glever dre selaouennañ feilhenoù ar grezenn pe an amgalonenn tanijennet da-geñver ar finvoù anal pe kalon.

vagal ◇ **vagal** ◇ **dispizel** aa., **dispis-** A-zave d'an nervenn dispis.

vagin ◇ **vagina** ◇ **gouin** g. Kanol gaherliennek, organ benevel an embarañ, o vont eus gouzoug ar grozh d'ar c'hourzh, lec'hiet e kavenn al lestr, etre ar c'hwezhiell war ziaraok hag ar fraezh war ziadreñv.

vaginal ◇ **vaginal** ◇ **1 gouin-, gouinel** aa., ~ **(ar) gouin 2 gouinek** aa., **a-c'houin** 1 A-zave d'ar gouin. 2 Termenoù arveret er gorfadurezh, evel *askouezh gouinek an ampeleñ* pe *rann a-c'houin ar gouzoug*⁶.

vaginale ◇ **tunica vaginalis** ◇ **gouinsae** b. Sae c'houinek ar glidenn, a se an adanv *gouinsael* Gl. *vaginal*, a-zave d'ar gouinsae.

vaginalite ◇ **vaginalitis** ◇ **gouinsaefo** g. Tanijenn lemm pe henek gouinsae ar glidenn.

vaginisme ◇ **vaginismus** ◇ **gouingeuzigezh** b., **raskrez ar gouin** (sl. *colpodynie, vaginodynie, vaginisme*).

vaginite ◇ **vaginitis** ◇ **gouinfo** g. Tanijenn glaourgenn ar gouin.

vaginose bactérienne ◇ **bacterial vaginosis** ◇ **vaginoz** g. **bakteriel** Gouinfo anspesadel naouus dre wennaouezioù flaeerius ma kaver kelligoù ditourus goloet gant bakteri bihan Gram – pe + (*Gardnerella vaginalis*), kevredet pe get gant anaeraded. Kizidik eo ouzh ar metronidazol.

vagolytique ◇ **vagolytic** ◇ **dispistolc'her** aa. O tolc'hañ an nervenn dispis ha, dre astenn, an nervreizhiad parasimpatek (sl. *atropine*).

vagomimétique ◇ **vagomimetic** ◇ **dispiskeveler** aa. Gant gweredoù leteñvel ouzh re devoudet gant fraouaat an nervenn dispis.

vagotomie ◇ **vagotomy** ◇ **dispisenbenañ** Skejañ surjanel an nervenn dispis (10vet daoudañ a-glopenn).

vagotonie ◇ **vagotonia** ◇ **dispizusvroud** g., **vagotoniezh** b. Stad o naouiñ dre un usvroudadusted eus ar reizhiad parasimpatek, o tevoudañ un heuliad strafuilhoù, ar pennañ anezho o vezañ : ar c'halonistead, an tuadur d'an ezwalioù ha d'an enkrezh, ar mabisvoll gant reledanded faout ar malvennoù, ar c'hweziñ o sezañ er bleñchoù, an halviñ, an usklorhidregezh, ar goustivadur andagel gant frapadoù darc'hoal, strafuilhoù analadel. Ensinkladur endan-groc'hen 1 cg pilokarpin a zevoud, en degouezh-se, un halviñ hag ur c'hweziñ kreñv, tra ma ne ro ensinkladur 1 mg adrenalin na troazhc'hlukezegezh nag ustroazh. Azonoù ar dispizusvroud zo ar gin eus ar re arsellet gant ar simpatikotoniezh (*usren simpatek*), an div stad o vezañ kevenebet.

vagotonique ◇ **vagotonic** ◇ **1 dispisvroudek** aa., **vagotonek** aa. **2 dispisvroudeg** g. -eion, **vagotoneg** g. -eion 1 Gant ar gouzrec'h ma sour ar vroudadusted dispizel. 2 Gouzrec'h vagatonek.


vague : nerf ~ ◇ **vagus nerve** ◇ **nervenn** b. **dispis** Dekvet daoudañ a-glopenn, enni gwiennoù parasimpatek niverus kenan en erdu ar flugez.

⁶ Guy Étienne, *Geriadur ar Gorfadurezh*, Eil embannadur reizhet, Preder, 1999

vairons : yeux ~ ◇ eyes of different colours ◇ daoulagad (envez)alliv A-zivout an daoulagad a zo dezho kanevedennoù dezho livrezhoù kevarall gant an un hinienn (sl. *hétérochromie*).

vaisseau ◇ vessel ◇ gwazhiedenn b. -où, gwazhied Termen hollek o teanviñ ar sanioù ma tremen ar gwad pe al limf : talmerennoù, gwazhiannoù, korrwazhied, gwazhied limf.

valence ◇ valence ◇ amsav g. A-zivout un elfenn, ar galloud kediañ kementadel anezhi. Da skouer : en dour H₂O ez eo amsav an H par da 1 ha hini an O par da 2; er metan CH₄, amsav pep H zo par da 1 ha hini C par da 4; en aketilen C₂H₂, amsav pep C zo par da 4 ha hini pep H par da 1.



Amsav un ionenn zo par da niver an tredanvec'hiadoù elfennel (+ pe -) douget ganti, eleze niver an elektron gounezet (evit an ion leiel) pe niver an elektron kollet (evit an ion muiel) e-doug an ionekadur.

valétudinaire ◇ valetudinarian ◇ klañvidik aa. A-zivout ur gouzrec'h fall e yec'hed.

valeur globulaire (VG) ou **hémoglobinique** ◇ globular value ◇ gwerzhad b. **hemoglobin ruzkelligel, hemoglobin ruzkelligel (HR)** Keñver etre feur an hemoglobin ha niver an eritrokrit amredat, par da 1 ent reol. Uheloc'h eget 1,1 en amwad yud hag izelaet dindan 0,85 en amwadoù islivel. En devoud, saveladur ar werzhad ruzkelligel ne zitour ket a-walc'h bec'h hemoglobin an eritrokrit, pa na engwerc'h ket an hematokrit; he amsaviñ a reer gant dewerzhadur ar bec'h hemoglobin ruzkelligel keitat.

valeur prédictive ◇ darganusted b. A-zivout un arouez pe ur prouad. Emañ e dalc'h kizidigezh ha spesadelezh ar prouad hag ivez revezusted ar c'hleñved er boblañs desellet. — **darganusted yaek (DY)** (Gl. *valeur prédictive positive*) : tebegezh bezañs ur c'hleñved mar bez bezant an arouez ha yaek ar prouad. — **darganusted nac'hek (DN)** (Gl. *valeur prédictive négative*) : tebegezh ezvezañs ur c'hleñved mar bez ezvezant an arouez pe nac'hek ar prouad.

	Klañv	Yac'h	Hollad
Yaek	a	b	a + b
Nac'hek	c	d	c + d
Hollad	a + c	b + d	N

$$DY = p(\text{klañv/yaek}) = \frac{a}{a+b} \quad \text{ha} \quad DN = p(\text{yac'h/nac'hek}) = \frac{d}{c+d}.$$

E gerioù all, en ur prouad e klot neuze an darganusted yaek ouzh niver ar wiryaeion a-douez hollad an dud yaek hag an darganusted nac'hek ouzh niver ar wirnac'heion a-douez hollad an dud nac'hek.


valgisant ◇ ezkammus aa. O tevoudañ un ezkamm.

valgisation ◇ valgisation ◇ ezkammañ Lakaat en ezkamm.

valgus ◇ valgus ◇ ezkamm aa. & g. A-zivout un ezel pe ur rann ezel gwariet war ziavaez, da skouer : *ilin ezkamm, meud troad ezkamm, dorn ezkamm, troad ezkamm*.

validité ◇ validity ◇ 1 barregezh b. 2 gwirigezh b. 1 Evit a sell un den, gouested da gefleunian e gefridi, e labour. An ez den zo ur *barreg* enta. 2 Evit a sell ur prouad o kevaraezañ daznaout ar gouzrec'hioù salv pe ar re dizhet gant ur c'hleñved savelet. Emañ e dalc'h ar gizidigezh hag ar spesadelezh.

valine ◇ valine ◇ valin g. Amindrenkenn alifatek bevret kedrann ar proteinoù.



vallécule ◇ **vallecula** ◇ **kampoullig** g. Termen korfadurezh o talvezout kement hag un nant, ur bukadenn, da skouer : *kampoullig an ilpenn*.

Valleix : **lois de** ~ ◇ ◇ **savelennoù** l. (b.) **Valleix** Savelennoù o ren war lec'hiadur ar poentoù laurus ouzh ar pouezañ en nervostoù. Emañ ar poentoù-se : — 1° ouzh flosk ar c'hefioù nerval ; — 2° ouzh poentoù treizhañ ar c'higennoù gant ar strelloù nerval o vont etrezek ar c'hroc'hen ; — 3° e par distroll endermel ar barroù pellek ; — 4° el lec'h ma 'z eo bas kenan ar c'hefioù nerval.

Valleix : **points de** ~ ◇ **Valleix's points** ◇ **poentoù** l. (g.) **Valleix** Poentoù laurus arsellet en nervostoù diseurt war dreug an nervennoù klañv. O lec'hiadur a gempleg da savelennoù Valleix.

Valsalva : **épreuve** ou **manœuvre** ou **test de** ~ ◇ **Valsalva's test** ◇ **prouad** g. pe **embreg** g. **Valsalva** Kalvezder o kevaraezañ uhelaat ar gwask er fric'hargadenn dre ec'hanalad helc'het, genoù serr ha divfron piñset, e sell da assav pe da amprouiñ heforzhed ar gorzenn glevedel. Seurt embreg a uhela ar gwask enbruskel, ar gwask talmerel a-skevent hag ar gwask gwazhiennel trobarzhel, hag a izela ivez an distro gwazhiennel er galon. Gwanaat a ra ivez kreñvder an holl sourroù kalon, nemet hini ar c'halongaherad stevius a zo kreñvaet. Pa baouez an embreg dre adkregiñ da anañ ez adkav sourroù ar galon dehoù o c'hreñvder kent re ar galon gleiz.

Valsalva : **sinus de** ~ ◇ **sinus of Valsalva** ◇ **god** g. **an aortenn** Pep hini eus an tri frankadur gwriazienn an aortenn lec'hiet a-us da bep hini eus an teir sac'hell gornloarek. An talmerennoù kurunerel kleiz ha dehoù a loc'h eus div anezho.

valve ◇ **valve** ◇ **trapig** g. Un trapig eus ar galon zo un elfenn o tispartiañ ar c'havennoù hag o virout ouzh ar gwad a zistreiñ war an tu fall. Er galon ez eus pevar zrapig : — an trapig mintrek etre ar c'hentez kleiz hag ar c'hofig kleiz ; — an trapig tribroudek etre ar c'hentez dehoù hag ar c'hofig dehoù ; — an trapig aortek etre ar c'hofig kleiz hag an aortenn ; — an trapig skeventel etre ar c'hofig dehoù hag ar c'hef a-skevent.

valvulaire ◇ **valvular**, **valvar** ◇ **trapigel** aa., ~ **trapig**, **trapig-** A-zivout un trapig, eus ar galon pergen.

valvulaires cardiaques : **prothèses** ~ ◇ **valvular cardiac prosthesis** ◇ **trapigosodoù** l. (g.) **kalon** Trevnad kalvezadel disezet war an igorennoù kalon, gant amredad ezkorfel hag amkanet da gefleuniañ arc'hwelioù ar benvegadoù trapigel disleberet ha dazbidet. An trapigoù kalvezadel zo dre voullig, dre gantenn wint, dre askelligoù (sl. *bioprothèse, hétérogreffe valvulaire*).

valvule ◇ **valvule** ◇ **sac'hell** b. Aspleg lienennek oc'h amparañ an trapigoù.

valvulectomie ◇ **valvulectomy** ◇ **trapigezbenañ** Dazbidañ hollel pe darnel un trapig kalon.

valvulite ◇ **valvulitis** ◇ **trapigfo** g. Tanijenn un trapig, dreist holl un trapig kalon.

valvulopathie ◇ **valvular disease** ◇ **trapiganaez** g. Anaev o tizhout un igoren galon.

valvuloplastie ◇ **valvuloplasty** ◇ **trapigatelviñ** Nep gwezhiadenn ratreañ e par un trapig kalon anafek, evit dereizhañ un isvoll pe ur skorted vintrek, pergen.

valvulotomie ◇ **valvulotomy** ◇ **trapigenbenañ** Skejañ an trapigoù kalon embreget pa vez isvollek un igorenn.

Van Bogaert et Divry : **syndrome de** ~ ◇ **Bogaert-Divry syndrome** ◇ **azoniad** g. **Van Bogaert ha Divry** Azoniad nervgroc'henel hêrezhel treuzkaset er mod enkilek reveret. Naouus eo *ent neuziadurel* dre un angiomasoz strewek eus pluskenn an empenn hag ar pilhon hag un divielinaat eus ar poull vigelc'hiek ; *ent klinikel* dre zireizhoù loc'hadel pikernennek hag ampikernennek, barradoù droukfell, un envedi hag ul livegad kroc'hen gant korrwazhiedusvoll. Aozerion 'zo a sell ouzh an kez azoniad evel unan eus arbennoù azoniad Sneddon.

Van der Hoeve : **syndrome de** ~ ◇ **scleromalacia perforans** ◇ **azoniad** g. **Van der Hoeve** (sl. *scléromalacie*).

Van der Hoeve et de Kleyn : **triade de** ~ ◇ **Van der Hoeve's triad** ◇ **triad** g. **Van der Hoeve** Azoniad hêrezhel naouus dre kevreted un osteopsatiroz (breskted an eskern), livrezh glas al lersaeoù hag ur vouzarded pazennadek (sl. *ostéopsathyrose, maladie des hommes de verre*).

vanillisme ◇ **vanillism** ◇ **1 vanilhaegezh** b. **2 vanilhaallergiezh** 1 Pistriadur devoudet gant euvridigezh vanilha a zoenadoù paoterek. 2 Erzerc'hadou allergiek garv gant ar vicherourion o tornata ar vanilha ha dec'hanet gant un akarian, *Acarus siro*.

Van Laere : **maladie de** ~ ◇ **Van Laere's disease** ◇ **kleñved** g. **Van Laere** Seizi hirvel-pont henek argammedek gant bouzarded o teraouiñ er c'hrennoad hag arsellet gant ar beneved pergen.

Van Neck-Odelberg : **maladie de** ~ ◇ **Van Neck-Odelberg disease** ◇ **kleñved** g. **Van Neck-Odelberg** Osteokondroz barr a-stevier askorn al lez, o tarvezout gant bugale etre 6 ha 10 vloaz, naouus ent klinikel dre ul laur eus parzh uhelañ ar vorzhed, ur c'hleñh ha war ar skinlunioù, dre ur danavidigezh dizunvan eus gwiad an eskern a 'r barr a-stevier.

Van Slyke : **coefficient** ou **épreuve de** ~ ◇ **Van Slyke's test** ◇ **prouad** g. **Van Slyke** Reollun o kevaraezañ andalañ borc'hidigezh an urea gant al lounezhi a-gevreizh da vec'h un urea er gwad ha da ec'honad an troazh. An disoc'h zo ec'honad ar gwad e mL/min karzhet dioutañ an urea penn da benn. Dilezet eo reollunioù Van Slyke hiziv e gounid dizeul an urea (sl. *clairance*).

Van t'Hoff : **loi de** ~ ◇ **Van t'Hoff's rule** ◇ **savelenn** g. **Van t'Hoff** Gant ar bevion, nep uheladur gwrezverk eus 10 °C a zaougementa an dazgweredoù kimiek ha a vuia an erzerc'hadou bevedel (evel diskouezet gant dezventadurioù an eskemmoù aezhel). Evit pep spesad ez eus ur poent eizik hag en tu all dezhañ e tarvez direizhoù en ervez da zisoc'h gant ar marv.

vanylmandélique : **acide** ~ ◇ **vanylmandelic acid (VMA)** ◇ **trenkenn g. vanilmandelek** Ec'haozad ar metanefrinoù, a zo o unan kennevidadoù an adrenalin hag an noradrenalin. O ezvevnenigegzh dre an troazh a vez ent reol bihanoc'h eget 9 mg (45 µmol) dre 24 eurvezh; a-wechoù e sav sof-kont er feokromokitom (sl. *catécholamines*).

varice ◇ **varix** ◇ **teuc'hell** b. Bolc'hadur trebadek ur wazhienn, sezet ar peurliesañ e par rouedad vas an izili traoñ.

varicelle ◇ **chicken pox** ◇ **brec'h** b. **nij** Kleñved viruzel lemm terzhiennek, tredizhus ha darreuziat, kuñv ar peurliesañ, naouus dreist holl dre un dispuilhad kroc'hen krugennc'hwezigennek gant frapadoù kenheuilh. Ent reol e tisec'h ar c'hwezigennoù hep lezel kleizenn ebet ha parañ a ra ar c'hleñved e-doug 15 devezh mui pe vui. Nemedennek eo ar rouestladoù (anafou kroc'hen breingedek pe linus, garloc'hennfo, bronkezskeventfo, empennfo). Viruz ar vrec'h nij zo unrezh da hini ar senkl, kerentiad an *Herpesviridae*.

varicelliforme ◇ **varicelliform** ◇ **brec'hnijvanek** aa. Heñvel ouzh ar vrec'h nij.

varicocèle ◇ **varicocele** ◇ **teuc'hvozhell** b. Usvoll teuc'hellek gwazhiennoù ar funig sper oc'h erzerc'hañ e stumm ur goeñvenn vlot, laurus a-wechoù, eus ar gousac'h.

varicographie ◇ **varicography** ◇ **teuc'helluniñ** Skinluniñ ar gwazhiennoù teuc'hellek ensinklet enno un aozad dargemm demer ouzh ar skinoù X.

varicose ◇ **varicosis** ◇ **varikoz** g. Stad teuc'hellek.

variole ◇ **smallpox** ◇ **brec'h** b. Kleñved poreel grevus, tredizhus kenan, darreuziadek gwechall ha marvus alies, devoudet gant ur viruz (*Orthopoxvirus*) eus kerentiad ar *Poxviridae*, naouus dre un dispuilhad c'hwezigenburbuennnek. Steuziet eo penn da benn a-c'houde 1965, da heul ar c'houlzadoù ezvoudañ renet gant an ABY.

varioliforme ◇ **varioliform** ◇ **brec'hvanek** aa. Heñvel ouzh ar vrec'h.

variolique ◇ **variolic** ◇ **brec'hel** aa., ~**brec'h** A-zave d'ar vrec'h.

variolisation ◇ **variolization** ◇ **brec'hiñ**, **brec'hidigezh** b. Enkoriñ, a zen da zen, ur vrec'h skañv, embreget gwechall en un amkan erguradel.

varioloïde ◇ **varioloïd** ◇ **lezvrec'h** b. Furm guñv ar vrec'h, naouus dre ezvezañs al linadur hag un dedrovezh berrbad.

Variot : **signe de** ~ ◇ ◇ **arouez** b. **Variot** Bezañs brizhliennoù o c'holeiñ ribl rez an ankoue. Gwelet e vezont gant ar vugale tizhet gant ar c'hroup dre c'houlzizañ a-nerzh diaz an teod ha dre zevoudañ un heugenn.

variqueux ◇ **varicose** ◇ **1 teuc'helle** aa. **2 teuc'hellek** aa. **3 teuc'helleg** g. **-eion** 1 A-zave d'an teuc'helloù. 2 Tizhet gant teuc'helloù. 3 Gouziviad teuc'hellek.

varisant ◇ ◇ **enkammus** aa. A zevoud un enkamm.

varisation ◇ **varisation** ◇ **enkammañ** Lakaat war enkamm.

varus, **vara**, **varum** ◇ **varus** ◇ **enkamm** aa. & g. A-zivout un ezel, ur parzh ezel, troet pe gwariet war ziabarz. Da skouer : *troad potin enkamm* (Gl. *ped bot varus*), *ilin enkamm* (Gl. *cubitus varus*), *genu varum* (Gl. *genu varum*, *jambes arquées*). Evel pennanv e skouerioù evel : *seurtad enkamm a 'l lez, disneuziañ an troad war enkamm* (sl. *ped bot*).

vasa nervorum ◇ ◇ **talmerennigoù** l. (b.) **an nervennoù** Talmerennigoù magañ an nervennoù.

vasa vasorum ◇ ◇ **talmerennigoù** l. (b.) **ar gwazhied** Tamerennigoù magañ speur ar gwazhied bras.

vasculaire ◇ **vascular** ◇ **gwazhiedel** aa. A-zave d'ar gwazhied.

vascularisation ◇ **vascularization** ◇ **1 & 2 gwazhiediñ**, **eroueriañ**, **gwazhiedadur** g. 1 Bezañs, trevnadur pe paoted ar gwazhied en ur rannbarzh eus ar bevedeg. 2 Furmadur ha diorreadur gwazhied en ur rannbarzh eus ar bevedeg.

vasculopathie ◇ **vasculopathy** ◇ **gwazhiedanaez** g. (sl. *angiopathie*).

vasculo-toxique ◇ **vasculotoxic** ◇ **gwazhiedpistriek** aa. Argevezus ouzh ar gwazhied gwad.

vasectomie ◇ **vasectomy** ◇ **spersanezvenañ** Dazbidañ darnel pe hollel ar sanioù sper.

vaseline ◇ **petroleum jelly** ◇ **vazelin** Danvezenn sonnel gwenn pe arvelen, eliek, andileizh, o teuziñ da 40 °C. Amparet eo gant ur meskad hidrokarbidennoù, diwar strilhadur an tireoul. Danvezet e vez evel lenkrauzenn hag ambrougenn oganoù.

vasoactif ◇ **vasoactive** ◇ **1 gwazhiedwezhus** aa. **2 gwazhiedwezher** g. 1 O werediñ war gavnez ar gwazhied. 2 Danvezenn wazhiedwezhus.

vasoconstricteur ◇ **vasoconstrictive** ◇ **1 gwazhiedstrishaus** aa. **2 gwazhiedstrishaer** g. 1 O strishaat kavnez ar gwazhied. 2 dDanvezenn gwazhiedstrishaus.

vasoconstriction ◇ **vasoconstriction** ◇ **gwazhiedstrishaat** Leiaat kavnez ur wazhiedenn, dre argrezañ he c'haberwiennoù.

vasodilatateur ◇ **vasodilator** ◇ **1 gwazhiedfrankaus** aa. **2 gwazhiedfrankaer** g. 1 O vuiaat kavnez ar gwazhied. 2 Danvezenn wazhiedfrankaus.

vasodilatation ◇ **vasodilatation** ◇ **gwazhiedfrankaat** Frankaat ar gwazhied.

vasogénique ◇ **vasocogenic** ◇ **gwazhiedien** aa. A orin gwazhiedel.

vasomoteur ◇ **vasomotor** ◇ **1 gwazhiedloc'hadel** aa. **2 gwazhiedloc'her** aa. **3 gwazhiedloc'her** g. 1 A-zave da strishaat ha frankaat ar gwazhied. 2 A zevoud dargemmoù kavnez ar gwazhied (frankaat ha strishaat) 3 Danvezenn gwazhiedloc'her.

- vasomotricité** ◇ **vasomotoricity** ◇ **gwazhiedloc'herezh** g. Perzh ar gwazhied da strishaat pe da frankaat.
- vasopeptidase** ◇ **vasopeptidase** ◇ **vazopeptidaz** g. Enzim oc'h ec'haozañ ar vazopeptidoù. Kemm a lakaer etre : 1° *an endopeptidaz neptu* (NEP) a ya ouzh ar peptidoù gwazhiedwezhus ha 2° *enzim andreñ an angiotensin* pe *angiokonvertaz* (ECA) ha *tolc'her an vazopeptidazoù*.
- vasoplégie** ◇ **vasomotor paralysis** ◇ **seizi** g. ar **gwazhied, gwazhiedseizi** Gwazhiedfrankaat hollek dre seizi gwazhiedloc'hadel, eleze steuz tant speurioù ar gwazhied.
- vasoplégique** ou **vasoparalytique** ou **vaso-inhibiteur** ◇ **vasoinhibitor** ◇ **gwazhiedantant** aa., **gwazhiedseiziek** aa., **gwazhiedtolc'her** aa. Oc'h astaliñ tant speurioù ar gwazhied, dre *dolc'hañ* gwered nervernoù loc'hañ ar gwazhied ha, da heul, peluzañ kaherwiannoù ar speurioù.
- vasopresseur** ◇ **vasopressor** ◇ **1 uswaskeiat** aa. **2 uswaskeiad** g. 1 A-zivout un anadenn pe ul lia en araez da vuiaat ar gwask er gwazhied. 2 Lia uswaskeiat, alies sellet evel heñvelster gant gwazhiedstrishaer.
- vasopressine** ◇ **vasopressin** ◇ **vazopresin** g. (sl. *antidiurétique : hormone* ~, *vasopressine, ADH, pitressine*).
- vasostimulant** ◇ **vasostimulant** ◇ **1 gwazhiedusreüs** aa., **gwazhiedusreer** aa. **2 gwazhiedusreer** g. -ioù 1 O vuiaat tant kigennoù ar gwazhied. 2 Lia gwazhiedusreer.
- vasotomie** ◇ **vasotomy** ◇ **spersanenbenañ** Skejañ, flañchañ pe argoulmañ ar sanioù sper.
- NOTENN : An daou dermen *spersanenbenañ* ha *spersanezvenañ* zo damheñvelster, rak an dazbidañ darnel pe hollel a zevoud ar c'haonac'hded c'hourevel.
- vasotonie** ◇ **vasotonia** ◇ **gwazhiedtant** g. Tant ar gwazhied — a zo tant kigennoù ar gwazhied — zo savelet gant stad argrezañ kahergelligoù levn speurioù ar gwazhied.
- vasotrope** ◇ **vasotropic** ◇ **gwazhiedkerc'h** aa., **gwazhiedwezhus** aa., **gwazhiedwezher** aa. & g. O kerc'hañ ar gwazhied, o lenañ ent hanbarek outo, o wezhiñ warno.
- vasovagal** : **syndrome** ~ ◇ **vasovagal syndrome** ◇ **azoniad** g. **gwazhieddispizel** Kevreted ur gwazhiedfrankaat trobarzhel hag ur c'halonistead dre fraouaat an nervenn dispis, kiriek d'un iswask talmerel (sl. *nerfs vasosensibles : syndrome des* ~).
- vaso-vésiculectomie** ◇ **vasovesiculectomy** ◇ **sankellennsperezvenañ** Dilemel ar san sper hag ar gellenn sper keñverek.
- VAT** ◇ **VAT** ◇ **VAT** Boneg etrevroadel un adalf divgavenn gant fraouaat kofigel delanket gant ar wagenn P, kuit a heudiñ kofigel (sl. *stimulateurs cardiaques : code international des* ~).
- Vaughan : réaction de** ~ ◇ **Vaughan reaction** ◇ **dazgwered** g. **Vaughan** Erwezh dinoiñ ar barenn rumatoidel er gwadveizh leteñvel ouzh erwezh Waaler-Rose, ma amsaver an hemati deñved gant hemati denel ORh -, kizidikaet gant antikorfoù antiRh andazgludus. Kollet en deus deur e gounid arglask an antikorfoù anti-CCP (antipeptidoù korvellek kitrullinet), spesadeloc'h d'al liesarzhfo rumatoidel.
- VDD** ◇ **VDD** ◇ **VDD** Boneg etrevroadel un adalf divgavenn gant fraouaat kofigel delanket gant ar wagenn P, ha gant heudiñ kofigel (sl. *stimulateurs cardiaques : code international des* ~).
- VDRL : réaction** ~ ◇ **VDRL reaction** ◇ **dazgwered** g. **VDRL** Dazgwered malzenniñ dewerc'het war lavnenn war-benn deznaouiñ ar sifiliz, an anv anezhañ o vezañ teskanv diwar Sz. *Venereal Disease Research Laboratory*.
- Veau : méthode de** ~ ◇ **Veau's operation** ◇ **oberatadenn** b. **Veau** Araezad oberatael amkanet da barraat ouzh rannadur ar goul stavn, anezhañ dazluniañ ar goul e teir zalenn grafaelañ : glaourgenn ar fri, kigenn, glaourgenn ar genoù.
- vecteur** ◇ **vector** ◇ **1 trezouger** aa. & g. -ed, **trezougen** **2 sanier** aa. **3 sturiadell** b. 1 En arvevadoniezh, nep danvevad etreat en araez da treuzkas ur pore war-lerc'h un dedro en e vevedeg eus an hadenn kiriek. — En hiloniezh, molekul DNA ma 'z eo bet entoet ar c'henenn a venner ensoc'hañ en ur gellig ostiz war-benn daskemmañ an hil anezhi. 2 Anv a reer eus *nadoz sanier* (sl. *aiguille vectrice*). 3 Hanc'her a jedoniezh (sl. *champ de forces*).
- vecteur cardiaque** ◇ **cardiac vector** ◇ **sturiadell galon, kalonsturiadell** b. Derc'hennadur kevregat gremmder tredanel predel ar galon diwar-bouez ur bir (sl. *électrocardiovectogramme, électrocardiogramme vectoriel, vectocardio-gramme, vectogramme*).
- vectocardioigramme, vectogramme** ◇ **vectorcardiogram** ◇ **kalonsturiadwezad** g. -où, **sturiadwezad** g. -où (sl. *électrocardiovectogramme, électrocardio-gramme vectoriel, vectocardioigramme, vectogramme*).
- vectocardiographie** ou **vectographie** ◇ **vectorcardiography** ◇ **kalonsturiadwezañ** Lerc'hwezañ ur c'halonsturiadwezad ha studiañ an disoc'h.
- végétalisme** ◇ **true vegetarianism, veganism** ◇ **struzhdebereriezh** b. Doazhadur mezhurel, doare d'emvagañ diwar boued struzhel hepen.
- végétarisme** ◇ **vegetarianism** ◇ **hepkigouriezh** b. Doazhadur mezhurel o verzañ debriñ kig an holl loened. Aotreet e vez neoazh boued a orin loenel evel al laezh, ar vioù, ar mel, h.a.
- végétatif** ◇ **vegetative** ◇ **1 struzhel** aa. **2 struzhek** aa. 1 A-zivout an arc'hwelioù bevedel diazez, ar gwezhañ bevedel andiarvennn dindan reolerezh an nervreizhiad emrennek : amred, borc'hañ, h.a. 2 Evit a sell seurtoù bakteri, hadennoù, amoebou, da skouer, ez eus dezho *furmou struzhek*, eleze furmoù oberiat ma emaint o kennevidañ hag oc'h emrannañ.

végétation ◇ **vegetation** ◇ **struzhenn** b. Anafoù papilhomaouek sezet e par asplegoù ar c'hroc'hen pe ar glaourgennoù o soubañ en ul liñvenn hegus (sl. *adénoïde : végétations* ~s).

véhicule ◇ **vehicle** ◇ **ambrougenn** b. (sl. *excipient*).

Veillona ◇ **Veillona** ◇ **Veillona** Genad bakteri eus kerentiad ar *Veillonaceae*, kok Gram — anaerat ret strollet a zaouadoù, bezant ent reol en halv denel.

veine ◇ **vein** ◇ **gwazhienn** b. Gwazhiedenn o kas ar gwad eus ar c'horrwazhied betek ar galon. Niverusoc'h eo ar gwazhiennoù eget an talmerennoù. C'hoarvezout a ra ar speurioù anezhou eus teir sae : an *ensae*, ar *grennsae* hag an *esvae* pe *sae diavaez*, amparet gant elfennoù dastennek, kenglenel ha kaherel, diorreet nebeutoc'h eget en talmerennoù. E diabarzh ul lod eus ar gwazhiennoù ez eus sac'helloù, leteñvel ouzh re an igorennoù kalon, o virout ouzh distro ar gwad. Strollet eo ar gwazhiennoù e teir reizhiad : ar reizhiad wazhiennel skeventel, ar reizhiad wazhiennel hollek hag ar reizhiad wazhiennel porzh. Ar gwazhiennoù, ar re zon pergen, a heuilh treug an talmerennoù, div wazhienn o vezañ amdiriat evit pep talmerenn, gant un nebeut nemedennoù.

veine azygos ◇ **azygos vein** ◇ **gwazhienn ampar** Gwazhienn o tont eus gwazhienn dehou a-sevel an dargreiz, o vont betek ar wazhienn gav uhelañ hed-ha-hed kostez araok-dehou ar mellennoù, o tegemerout an div wazhienn ledampar lec'hiet a-gleiz d'al linenn greizer. Da neuze ez eo un dasforzhad etre an div reizhiad kav izelañ hag uhelañ.

veine cave inférieure ◇ **inferior vena cava** ◇ **gwazhienn gav izelañ** Gwazhienn dev o teoueriañ an holl wad gwazhiennel eus an darn is-kelc'hspoureñn a r c'horf, furmet dre gember an div wazhienn a-glun boutin. Ar wazhienn gav izelañ a zegemer lies barr kengostezel, ha dasforzhed eo ouzh reizhiad ar wazhienn gav uhelañ dre ar gwazhiennoù ampar.

veine cave inférieure : syndrome de la ~ ◇ **inferior vena cava syndrome** ◇ **azoniad g. ar wazhienn gav izelañ** Teskad strafuilhoù diwar astal an amred er wazhienn gav izelañ, steviet gant un tromboz pe amwasket gant ur yoc'henn gefin (kankr al lounezh). Diheverzh int : gouliñvoù skañv an izili traoñ, laurioù dargreiz pe kof, amred kengostezel e par gwrizienn an divvorzhed, ar c'hof bihan, an dargreiz. Ar rouestlad muiek anezhañ, an enfroù skevent, en erzerc'ha alies hag ar prederiadurioù enepkaouediñ, fibrinloezañ pe surjianañ zoken a vez amkanet dreist holl da hepkoriñ an kez enfroù.

veine cave supérieure ◇ **superior vena cava** ◇ **gwazhienn gav uhelañ** Gwazhienn dev o teoueriañ an holl wad gwazhiennel eus an darn us-kelc'hspoureñn a r c'horf, furmet dre gember an daou gef gwazhiennel brec'h-penn. Ar wazhienn gav uhelañ ne zegemer, ent reol, nemet ur barr kengostezel, ar wazhienn ampar ha difourkañ a ra er c'hentez dehou war-lerc'h un treug berr diazerc'h war-ziskenn.

veine cave supérieure : syndrome de la ~ ◇ **superior vena cava syndrome** ◇ **azoniad g. ar wazhienn gav uhelañ** Teskad strafuilhoù amred diwar steviadur ar wazhienn gav uhelañ, dre amwask, tromboz pe dre gevreted an div wikefre ; erzerc'hañ a ra ent klinikel dre un dardenn gwazhiennel eus ar gouzoug hag eus an izili krec'h, kevret gant ur gouliñv pelerinnenek.

veine porte ◇ **portal vein** ◇ **gwazhienn borzh** Gwazhienn amparet gant kember gwazhienn ar felc'h gant gwazhienn uhelañ ar gandedenn. Deoueriañ a ra etrezek an avu gwad ar felc'h hag an organoù koazhañ.

veines pulmonaires ◇ **pulmonary veins** ◇ **gwazhiennoù ar skevent** Gwazhiennoù arc'hwelel ar skevent oc'h eroueriañ ar gwad ruz, oksigenet, etrezek ar c'hentez kleiz. Mont a reont war dreuz war ziabarzh ha dasforzhañ e speur adreñv ar gavenn-se. Bez' ez eus peder anezhou : div zehou ha div gleiz, div grec'h ha div draoñ.

veineux ◇ **venous** ◇ **gwazhiennel** aa. A-zave d'ar gwazhiennoù.

veinite ◇ **venous** ◇ **venit** g. Hegadur endotelienn ar gwazhiennoù, devoudet gant ensinkladurioù engwazhiennel anlestadel eus dileizhennoù 'zo, en ervez da zisoc'h gant steviadur ar wazhienn dre un araezad anlestadel (prederiadur an teuc'helloù dre ensinkladurioù sklerozus).

veinosité ◇ **gwizhienn** b., **gwizhi** s. Gwazhienn vihan hewel a-dreuz d'ar c'hroc'hen.

vélamenteux ◇ **velamentous** ◇ **1 gouelek** aa. **2 gouelek**, **argennennat** aa. 1 E stumm ur gouel. 2 A-zave da gennennoù ar vi denel. Skouer : *enlenad gouelek ar funig vegetal* (Gl. *insertion vélamenteuse ou en parapluie du cordon ombilical*) pe *enlenad argennennat ar funig vegetal*, eleze war gennennoù ar vi ha n'eo ket war an dorzhienn. Gwazhied ar funig a dizh an dorzhienn digevret o trehentiñ etre ar c'hennennoù.

velvétique ◇ **velvet-like** ◇ **voulouzvanek** aa. A neuz d'ar voulouz.

vena contracta ◇ **vena contracta** ◇ **vena contracta** Er c'halonstenerluniñ dopler, tachad ma emañ ar flistr ezreol strafuilhat (skorted vintrek, isvoll aortek) en e strishañ ha tizh al lanvad en e greñvañ.

véneux ◇ **venous** ◇ **pistrius** aa. Oc'h enderc'hel ur pistri.

vénérologie ou **vénérologie** ◇ **venereology** ◇ **gweneroniezh** b. Diskiblezh o studiañ ar c'hleñvedoù gwenerel.

vénerien ◇ **venereal** ◇ **1 gwenerel** aa. **2 gwenereg** g. -eion, **gweneregez** b. -ed 1 A-zave pe devoudet gant ar gread revel. 2 Gouzrec'h tizhet gant ur c'hleñved gwenerel (sifiliz, blennoragiezh, livant meizh, h.a.).

vent du boulet ◇ **blast** ◇ **gwagenn** b. **edru**, **gwagenn vlosk**, **bloskavel** b., **rutenn** b. **vlosk**, **aerstroñsad** g., **aerourad** g., **c'hwa** g. Tachad aer voustret o tont a-raok ar saezheloù (tarzhioù obuz), o treuzkas d'ar bevedeg an aerstroñsad devoudet gant ar bloskad, a se anafoù flugezel hep anafoù an amwiskadoù (sl. *onde de choc*, *blast injury*, *blesure par souffle*, *accident du souffle*).

vent du midi : syndrome du ~ ◇ ◇ **azoniad b. avel ar C'hreisteiz** Azoniad arsellet e Lyon gant magadelled vresk, pa c'hwezha avel ar C'hreisteiz, naouus dre gefrou, garmoù hag un uswrez. Devoudet eo gant un दौरisvec'hiañ herrek dre ar c'hroc'hen hag ar skevent, diwar izeladur gleborverk ha muiadur gwrezverk an aergelc'h.

ventilation alvéolaire ◇ **alveolar ventilation** ◇ **gwentadurg. logigel** Kementad aer dre vunud en araez da zasperzhiañ en eskemmoù aezhennoù e par logigoù ar skevent. Jediñ a reer ar gwentadur logigel diouzh arv reollun-mañ :

$$G_L = (E_R - E_S) \times T_A$$

G_L = gwentadur logigel E_R = ec'honad red E_S = ec'h-onad sod^h (150 mL) T_A = tead an anal (war-dro 12 - Ent keitad ez eo par ar gwentadur logigel reol da 4 L/min, gant an oadour er 16 kor) paouez.

ventilation maxima (VM ou VMX) ou ventilation maxima-minute (VMXM) ◇ **maximum ventilatory capacity** ◇ **barr g. anañ uc'hek dre vunud, gwentadur g. uc'hek** Ec'honad aer uc'hek a vez gwentet ent diarvenn gant ar skevent e-doug ur munud. Ent reol emañ er gavael eus 100 da 160. E vuzuliañ a reer diwar-bouez un anañ an donañ hag an herrekañ gwellañ, arreet e-pad 10-30 eilenn; ar peuliesañ en en jeder dre liesaat dre 30 an ec'honad ec'hanañ uc'hek dre eilenn.

ventilation/circulation : rapport ◇ **ventilation-perfusion ratio** ◇ **keñver g. gwentad-amredad** Keñver a zo, en ur gorread gwentadel desellet, etre ar gwentadur logigel ha lanvad gwad ar skevent, ar werzhad reol o vezañ 0,8 pe 4/5. Diouerek eo oksigenadur ar gwad talmerel er gorread gwentadel dindan imboure'h, mard eo strafuilhet an kez keñver; kement all ivez er skevent a-bezh, ma n'eo ket ar c'heñver an hevelep hini en holl c'horreadoù gwentadel.

ventilation-minute ou ventilation Mn ◇ **minute ventilation** ◇ **barr g. anañ dre vunud, gwentadur g.** Kementad aer, dewerzhet e litr, enanalet hag ec'hanalet e-doug ur munud gant loc'hadoù anañ reol o ampled. E jediñ a reer dre liesaat an ec'honad red dre niver an analadoù dre vunud; ent reol emañ er gavael etre 5 ha 9 L (ent keitad 6 L), er paouez (eus 3 da 4 L dre vunud ha dre metr karrez gorread korf).

ventouse ◇ **cupping glass, ventouse** ◇ **mandoz b. -ioù** Kloc'hig gwer arloet war ur poent bennak eus an amwiskadoù, goude bezañ skarzhet un darn eus an aer; seurt araezad destrummañ lec'hiek zo bet dilezet (sl. *capillarodynamomètre*).

ventre en bateau ◇ **scaphoid abdomen** ◇ **kof g. skafek** Pukadur lodenn greiz ar c'hof e-doug anaезioù 'zo (kolera, pilhonfo torzhellek, gwentl plomel).

ventre de batracien ◇ **frog belly** ◇ **kof g. ranek** Kof arblat e-doug an torliñvoù henek.

ventre en besace ◇ **pendulous abdomen** ◇ **kof g. bisac'hek** Kof a-ispilh evel ur yalc'h wak dreist juntad ar c'haezour, a vez arsellet gant ar vorreion hag al liesganerezed.

ventre de bois ◇ **wooden belly** ◇ **kof g. koad** Dargrezad trebad ha laurus kigennadur ar c'hof, naouus d'an ampelennfo lemm.

ventre de fourchette ◇ ◇ **kof g. forc'higell** Anv disneuziad an arzorn arsellet e seurtadoù torr penn izelañ ar werzhid o reiñ d'an dorn neuz kof ur forc'higell, e dianlen dilec'hiadur an drailhoù eskern war raok.

ventre en obusier ◇ ◇ **kof g. obuzerek** Disneuziad ar c'hof naouus dre ur rakvaliregezh kreizer, arsellet e degouezh ar glañvourion tizhet gant an torliñv en deroù (ampelennfo torzhellek a neuz torliñvel).

ventriculaire ◇ **ventricular** ◇ **1 kofigel aa., -kofig, ~kofig 2 kambrel aa.** 1 A-zave d'ur c'hofig kalon. 2 A-zave d'ur gambr empenn.

ventricule ◇ **ventricle** ◇ **1 kofig g. 2 kambr b.** 1 Pep hini eus an div gavenn a 'r galon, dehou ha kleiz, loet a-ziaerok ar c'hentezioù ha dispartiet an eil diouzh egile gant an dilhenn etre-kofigoù. Ar c'hofigoù a zegemer ar gwad eus ar c'hentezioù keñverek dre an igorennoù kentez-kofig, hag e gas a reont e kef ar skevent evit a sell ar c'hofig dehou hag en aortenn evit a sell an hini kleiz. 2 Kavennoù loet en empenn, ar c'hambrou kostezel e pep hanterenn empenn, an trede en dreuzempenn hag ar pevare etre ar c'hef empenn hag an ilpenn.

ventricule droit à double issue ou à double sortie ◇ **double-outlet right ventricle** ◇ **kofig dehou daouezvoned** Kammneuziad kalon dibaot kaer. Bez' ez eo ur seurtad kammload gwazhied bras eus an diaz : an aortenn ha kef ar skevent a loc'h eus ar c'hofig dehou, ar c'hofig kleiz o kas ar gwad a zo ennañ en hini dehou dre ur c'hehentad etre-kofigoù ledan ar peurliesañ. Diouzh sez ar c'hehentad e teskriver daou rizh eus ar c'hammneuziad-se : *ar rizh I*, ma emañ ar c'hehentad a-ziadreñv ha dindan ar gribenn us-kofig, an daolenn o vezañ hini ur c'hehentad etre-kofigoù gant uswak talmerel skevent; *ar rizh II*, ma emañ ar c'hehentad a-ziaerok hag a-us d'ar gribenn us-kofig, dindan igorennef kef ar skevent : azoniad Taussig-Bing eo, gant un dulaz muiiek. Ouzhpenn se emañ ar c'hammneuziad en ervez da vezañ rouestlet gant un isvoll eus kef ar skevent : heñvel kenan eo neuze ouzh pevaradezh Fallo.

ventricule gauche à double issue ◇ **double-outlet left ventricle** ◇ **kofig kleiz daouezvoned** Kammneuziad kalon nemedennek, ar seurtadoù daskenat anezhañ o vezañ boutin etrezo *ent neuziadurel* eskor klok pe sourus ar gwazhied bras diwar ar c'hofig kleiz ent korfadurel. Ar peurliesañ e vez ur c'hehentad etre-kofigoù endan-aortenn gant isvoll ar c'hef skevent; lies ezreolder all a vez kevredet outañ. A se e stader meur a daolenn *glinikel*, hag ivez lies modelezh prederiañ ha lies deznaou.

- ventricule unique** ou **ventricule commun** ◇ **single ventricle** ◇ **kofig unel** pe **kofig boutin** Kalonanaez ganedigel naouus dre ur gavenn gofigel unel, ec'hon, o tegemer gwad eus an daou gentez dre un igorenn voutin pe div igorenn dispartiet. Un adkavenn gofigel, krakelfennel, a c'hell kehentiñ gant an hini vras. An disc'h zo ur skoef kroaziet gant un dulaz bezus a-genfeur da bouez ur c'haeladur eus an amred en igorenn pe e kef ar skevent, en ervez da gevrediñ.
- ventricules superposés** ◇ ◇ **kofigoù arosodet** Kammneuziad kalon dibaot kenan, kevredet alies gant ar galon groaziet.
- ventriculite** ◇ **ventriculitis** ◇ **kambrfo** g. Erwezh foel o tizhout speurioù ar c'hambroù empenn. Ur pore enklouennel grevus eo, o tinodiñ gant gouzviaded o c'houzañv diwar strafuilhoù diseurt eus an nerveg kreiz. Ar feur marvusted diwar rouestladoù zo uhel kenan.
- ventriculo-atrïostomie** ou **ventriculo-auriculostomie** ◇ **ventriculoatrïostomy**, **ventriculo-atrial shunt** ◇ **amdreugañ kambr-kentez** Gwehennadur liñvenn ar c'hambroù empenn er c'hentez dehou diwar-bouez ur gorzenn voan kenan, amkanet da brederiañ empennfoeñvoù 'zo (sl. *dérivation du liquide céphalorachidien (LCR) dans l'hydrocéphalie*).
- ventriculo-cisternostomie** ◇ **ventriculocisternostomy** ◇ **amdreugañ kambr-oglen** Dasforzhad etre ar c'hambroù empenn hag an ogleñnoù endan-gevnidek, evit kevaraezañ gwehenniñ al liñvenn benn-kein e degouezh empennfoeñv diwar steviadur an toull etre-kambroù (sl. *dérivation du liquide céphalorachidien (LCR) dans l'hydrocéphalie*).
- ventriculogramme** ◇ **ventriculogram** ◇ **1 kofigvarwezad** g., **kofigwezad** g. **kofiglunad** g. 1 Lodenn eus ar c'halonvarwezad a-geñver gant gwerederezh ar c'hofig. 2 Skeudenn graet dre gofigluniñ.
- ventriculographie** ◇ **ventriculography** ◇ **1 kofigluniñ kambrmpennluniñ, kambrluniñ** 1 Imbourc'h skinluniñ ar c'hofigoù goude ensinklañ un danvezenn demer ouzh ar skinoù X. 2 Imbourc'h skinluniñ ar c'hambroù empenn goude ensinklañ aer. Ne vez ket mui embreget.
- ventriculoplastie** ◇ **ventriculoplasty** ◇ **kofigatelviñ** Dazluniñ surjiañ speur ar c'hofig gant dazbidañ un darvoll dianan-gwazhiad.
- ventriculotomie** ◇ **ventriculotomy** ◇ **1 kambrenbenañ 2 kofigenbenañ** 1 Enbenañ ur gambr empenn. 2 Enbenañ ur c'hofig, amkanet da zereizhañ un direizh kalon ganedigel pe arzeuat.
- venturi** ◇ ◇ **1 venturimetr** g. **2 gwered** g. **Venturi** 1 Ardivink da dalvez da jediñ kas ar gwad en ur wazhenn hever dre vuzuliañ ar c'hemm gwask a-raok ha war-lerc'h ar strishadur. Buanadur ha muiadur gwask devoudet en un heverenn dre ur strishadur.
- vérapamil** ◇ **verapamil** ◇ **verapamil** g. Enepmigorez ha gwazhiedfrankaer kurunerel.
- verbigération** ◇ **verbigeration** ◇ **arreluzañ** Deluzañ dislenadek ma vez arreet dibenndermen an hevelep gerioù pe bommoù.
- verdunisation** ◇ **verdunization** ◇ **verdunekaad, verdunekadur** g. Mod puraat an dour evañ, naouus dre zanveziñ kementadoù klor bihan kenan (un dekimiligramm dre litr dour), emgefregezh ar meskañ diwar-bouez un trevnad diverañ dibarek eus an dour javel, ribouilhadr nerzhak an dour. An araezad-se a voe kentradet e Verdun, e-kerz seziz ar gêr e gwengolo 1916 pergen, en arbenn eus bezañs kelanoù tud ha loened e-leizh er gwazhioù ha pontoù dour.
- vergence** ◇ **vergence** ◇ **ankensteud** g. Fiñv an daoulagad ma paouez ar gwelahelioù a vezañ kenstur, pe e kengerc'hont, pe e kenforc'hont.
- vergeture** ◇ **vibex**, l. **vibices** ◇ **stirgennad** g. Rizenn vihan diwar kroc'henisteñv, heñvel ouzh ur gleizenn, setet war ar c'hof pergen, war an divronn pe war an divvorzhed, devoudet gant freg gwiennoù dastennek an derm diwar dardennañ reñverek. Arsellet e vezont e-doug ar vec'hiegi, er borrdre hag e kleñved Cushing.
- vermiculaire** ◇ **vermicular** ◇ **1 preñvek** aa. **2 bordilhadek** aa. 1 A denn d'ur preñv dre e neuz, evel da skouer an *divilhenn breñvek*. 2 Oc'h anadiñ evel ur bordilhadr preñved, da skouer an *argrezañ bordilhadek*.
- vermifuge** ◇ **vermifuge** ◇ **preñvoudzher** aa. & g. **-ioù** A-zivout ul lia o kevaraezañ pe o tevoudañ ezvount ar preñved pervezat, arveret ivez evel pennanv. Menegomp ivez *eneppreñvek* aa. hag *eneppreñveg* g. *-ier*, termenoù damheñvelster. Ent resis neuze, ar *preñvoudzher* ne wered nemet dre lakaat ar preñved da dec'hout, tra ma 'zo ledanoc'h erdalva *eneppreñv* (Gl. *anti-vers*), eleze distrujañ ha/pe ezvoutañ ar preñved. Fraeshoc'h eo neuze *preñvlazher* (Gl. *vermicide*) (sl. *anthelminthique*).
- vermine** ◇ **vermin** ◇ **astuz** g. Anvad rumm an amprevaned arvevat ouzh an den hag al loened.
- vermineux** ◇ **verminous** ◇ **astuzien** aa. A zo devoudet gant astuz, da skouer : *kroc'heno astuzien skrapus*.
- vermieohe** ou **vermiote** ◇ ◇ **preñvilh** g. Danvezenn o nodiñ eus gorre angreizhek an epitoliom gourc'hennelligel e stumm edañvennoù arvelen, pa bouezur war an anaf.
- vermis** ◇ **vermis cerebelli** ◇ **preñv** g. **ilpenn** Lodenn strizh kreizer o tispartiañ an div hanterenn eus an ilpenn.
- vermis : syndrome du ~** ◇ **vermis syndrome** ◇ **azoniad** g. **ar preñv ilpenn** Teskad azonou dec'hant dre dizhad digevret ar preñv ilpenn ha lec'hiet en izili traoñ : distabiled al loadur war sav, digenurzh an argenk, nistagmuz a-zremm. Devoudet e vez gant ur poread pe gant ur yoc'henn; en degouezh diwezhañ-se ez eus un azoniad uswask enklouennel o tedeñ dre fapadoù kevredet gant barradoù da heul.
- vernal** ◇ **vernal** ◇ **gwiantenel** aa. A-zave d'ar gwianten, d'an nevez-amzer.
- Verner et Morrison : syndrome de ~** ◇ **Verner-Morrison syndrome, WDHA syndrome** ◇ **azoniad** g. **Verner ha Morrison** Azoniad naouus dre gevredet un darc'hoal dourek, puilhak, kilvers o tevoudañ दौरisvec'h ha strafuilhoù दौरkevionel, ur c'haliomwadisvec'h hag un aklorhidriezh stomok. Emañ e dalc'h bezañs un pe lies yoc'henn enborc'hadel, hogos atav

kelligoù an-β enezigoù an ilgreiz (dibaot ur feokromokitom), diwar vorc'hañ VIP (peptidoù pervez gwazhiedwezhus) gant an kez yoc'hennoù (yud evit an div drederenn eus an degouezhioù) — a se alies an anvad *vipom* roet d'an azoniad-se —, kevredet a-wechoù gant danvezennoù all, evel ar somatostatin, ar GIP, ar prostaglandinoù.

Vernes : réactions de ~ ◇ **Vernes's tests** ◇ **dazgweredoù** l. (g.) **Vernes** Dazgweredoù malzenniñ dispredet.

Vernet : syndrome de ~ ◇ **Vernet's syndrome** ◇ **azoniad g. Vernet** Anaf an X¹, XI¹ ha XII¹ nervenn a-gloenn o tremen dre an toull fregek a-gerc'henn. Erzerc'hañ a ra dre ul ledseizi hag ul ledaneraez eus ar ouel stavn, ar c'harloc'henn hag ar c'hargadenn, hag eus ar c'higennoù glerenn-trebez-brennigenn hag an tristurie. Devoudet e vez gant ur yoc'henn wazhiedel oc'h amwaskañ an nervennoù, pe gant lezwagrennoù.

Verneuil : maladie de ~ ◇ **Verneuil's disease** ◇ **kleñved g. Verneuil** Linadur fic'hek ar gwagrennoù c'hwezparañ (hidroza-denitoù) lec'hiet er c'hazelioù, er c'harbedenn, er barlennoù hag er peñsoù.

Verneuil : signes de ~ ◇ ◇ **arouezioù** l. (b.) **Verneuil** ^{1°} Arouez ameeun torr al lestr : pouezañ skañv war an div gribenn glun en ur ser, o luskañ ur c'hendostadur anezho, a zevoud ul laur e par al linennoù torr. — ^{2°} arouez torr an eskern kreizdorn : disvountañ a ziaaraok da ziadreñv ar biz keñverek a zevoud ul laur grizias e par al linenn dorr.

vernix caseosa ◇ **vernix caseosa** ◇ **vernix caseosa**, **vernix** g. Lindrad soav o c'holeñ kroc'henn ar grouell pe an nevez-c'haned.

Verocay : nodule de ~ ◇ **verocay's body** ◇ **nozelenn b. Verocay**, **nozel s. Verocay** Furmadur arsellet en neurinomoù amparet gant elfennoù gwiennel strollet e punelloù.

verre : homme de ~ ◇ ◇ **den g.) hedorr** Klañvour tizhet gant an osteopsatiroz (sl. *ostéopsathyrose*, *maladie des hommes de verre*).

verrouillage : syndrome de ~ ◇ **locked-in syndrome** ◇ **azoniad g. an enbac'hadur**, **azoniad ar prennadur** Stad nerval dibaot ma emañ ar gouziviad dihun hag emouez penn da benn — gwelout a ra pep tra, klevout a ra pep tra —, met ne c'hell na fiñval, na komz, diwar ur seizi klok, lakaet er-maez fiñval ar malvennoù hag a-wechoù an daoulagad (ar fiñvoù diazerc'h a vez miret ar peurliesañ), tra ma vez kevan galloudezhioù an naout (sl. *désefférentation* ha *mutisme akinétique*).

verruciforme ◇ **verruciform** ◇ **gwenaennvanek** aa. Heñvel ouzh ur wenaenn.

verrucosité ◇ **verrucosis** ◇ **amstruzhegenn** b. Yoc'henn groc'henn vihan struzhennek kevredet gant hiperkeratoz.

verrue ◇ **verruca**, **wart** ◇ **gwenaenn** b. Yoc'henn groc'henn guñv a orin viruzel (papovaviruz), bras pe vrasoc'h, tredizhus hag enkoradus, amparet gant un usteñv eus begennoù an derm, sezet dreist holl war an daouarn, war an daoudroad ha war an dremm. — **Ar gwenaennoù plaen yaouerel** (Gl. v. *planes juveniles* Sz. *verruca plana juvenilis*) : krugennoù bihan arblat, levn, lec'hiet dreist holl war an dremm ha kein an daouarn, o tizhout ar yaouerion. — **Ar gwenaennoù neudheñvel** (Gl. v. *filiformes* Sz. *verruca filiformis*) : hirvoan ha keratozek, o tiñvañ war an tachadoù barvek, ar malvennoù hag an divweuz. — **Ar gwenaennoù solel** (Gl. v. *plantaires* Sz. *plantar wart*) : papillomoù kuñv a orin viruzel, o nodiñ war dachadoù harpañ sol an troad. — **Ar gwenaennoù kozhiadel pe soavredel** (Gl. v. *séniles ou séborrhéiques*) : seurtad gwenaennoù plaen, paot gant an henaded, goloet gant ul lindrad keratozek druz. — **Ar gwenaennoù vulgaires** (Gl. v. *vulgaires* Sz. *verruca vulgaris*) : tosennoù kornin peuzvalirek, torgennek pe vodennek ar gorre anezho, sezet war gein an daouarn hag an treid, dibaotoc'h war an dremm ha war sol an treid.

verruqueux ◇ **verrucose**, **warty** ◇ **1 gwenaennek** aa. **2 amstruzhek** aa. 1 Gant gwenaennoù pe a neuz d'ur wenaenn. 2 A-zivout furmoù 'zo a gleñvedoù (torzhellegezh, sifiliz, liken), gant krugennoù gronnet o reiñ ur gorre direoliek, garv.

version ◇ **version** ◇ **1 amc'hwel g. 2 treiñ 3 c'hwelad** g. 1 Kalvezder gwiliouderezh, anezhañ daskemmañ erload ar grouell evit unan all emsavusoc'h. — **amc'hwel daouvleñ** (Gl. v. *bipolaire* Sz. *bipolar v.*) : embreget e vez war daou vlein ar grouell, un dorn o pouezañ war ar c'horf e lec'h un eizhaenn a 'r grouell, daou viz eus an dorn all o vezañ entoet er grozh evit tapout ar parzh oc'h erloañ. — **amc'hwel ar penn** (Gl. v. *céphalique* Sz. *cephalic v.*) : amkanet evit degas penn ar grouell e par an digor krec'h. Ar peurliesañ e vez embreget dre gefleñvadoù diavaez da-geñver erloadoù diadrez. — **amc'hwel dre gefleñvadoù diavaez** (Gl. v. *par manœuvres externes* Sz. *external v.*) : embreget gant an daouarn a-dreuz da speur ar c'horf war-benn treuzfurmiñ un erload revr en un erload kitem, pe un erload diadrez diahed. — **amc'hwel dre gefleñvadoù diabarzh** (Gl. v. *par manœuvres internes* Sz. *internal v.*) : embreget e-doug ar gwilioud gant an dorn e-barzh ar grozh, enneget da-geñver erloadoù diadrez. Diouzhtu war-lerc'h e vez eztennet ar grouell. — **amc'hwel dre gefleñvadoù kemmesk** (Gl. v. *par manœuvres mixtes* Sz. *bipolar v.*) : sl. **amc'hwel daouvleñ**. — **amc'hwel an treid** (Gl. v. *podalique* Sz. *podalic v.*) : o kevaraeziñ degas revr ar grouell e-par digor krec'h al lestr, dre dapout an treid gant kefleñvadoù diabarzh. — **amc'hwel emdarzh** (Gl. v. *spontanée* Sz. *spontaneous v.*) : kemm erload ar grouell er grozh o c'hoarvezout er seizhvet miz. 2 El lagadouriezh, fiñval kevreet an daoulagad, ar gwelahoù anezho o chom kenstur, da skouer *dehoutreiñ*, *kleiztreiñ*. 3 Evit an organoù, pa vez ur stouadur pe ur veskellegezh, da skouer *rakc'hwelad*, *drekc'hwelad*, *tuc'hwelad*.

vertebra plana ◇ **vertebra plana** ◇ **vertebra plana**, **kleñved g. Calvé** Er skeudennerezh mezegel, arblated eizhañ ar c'horf mellenn hep astenn adreñv, na disleberad an esaouennoù diskel keñf, oc'h erzerc'haat un distruj herrek eus an askorn hag a vez gwelet en histiokitoz langerhansel pergen. Unan eus arbennoù ar mellennissavioù arzeuat eo.

vertèbre ◇ **vertebra** ◇ **mellenn** b. Pep hini eus an 33 da 34 askorn arosodet a ampar al livenn gein. C'hoarvezout a ra ar velmenn eus : ur parzh araok, bazhoulek, ar c'horf mellenn a zo an talioù krec'h ha traoù anezhañ dispartiet diouz ar vellennoù kefin gant an disk etre-melloù ; ur parzh adreñv, gwareg ar velmenn, amparet a bep tu gant troadigoù gwareg ar velenn a-ziaaraok ha lavnennoù

gwareg ar vellenn a-ziadreñv, oc'h amgacañ, gant tal adreñv ar c'horf, toull ar vellenn; ur balirad kreizer o loc'hañ eus ar wareg ha durc'haet war dreñv, a bep tu dezhañ ul lavnenn, ar baleg spernennek; div dosenn diazremm ha diadrez (e-keñver soutadur an troadigou hag al lavnennou), ar balegoù treuz; pevar balirad diazerc'h, daou e krec'h ha daou en traoñ, ar balegoù kenvelañ krec'h ha traoñ. Balegoù kenvelañ div vellenn diastok a zezvonn an toulloù etre-melloù (unan a-zehou, egile a-gleiz), ma teu er-maez an nervennoù a-livenn. Toulloù ar mellennoù arosodet a ampar kanol ar mellkein, enni ar pilhon hag ar mel a-livenn.

vertèbre carrée ◇ **squaring of vertebral body** ◇ **mellenn garzezek** Arouez skinlun al lestrvellennfo remmel: ribl araok ar vellenn gwelet a-letu zo eeunregek, tra ma vez argevek ent reol.

vertèbre d'ivoire ◇ **ivory vertebra** ◇ **mellenn ivor** Douesadur mellennel arsellet e kleñved Paget, kankr ar raksavenn, h.a.

vertèbre en cadre ◇ ◇ **mellenn sternvanek** Mellenn bagetek en dro dezhi ur stern askorn douesaet, arsellet war ur skinlun eus al livenn gein a-letu. Naouus eo d'ur c'hleñved Paget.

vertèbre en diabolo ◇ **hourglass vertebra** ◇ **mellenn diabolok** Strishaenn greizer ar vellenn e degouezhioù 'zo a remm henek, naouus war ar skinlunou.

vertèbre striée ◇ **striated vertebra** ◇ **mellenn rizennek** Arvez skinlunadel ur vellenn, ar c'horf anezhi rizennek gant linennoù kenstur demer, diazerc'h ha diazremm, oc'h erzerc'haat un douesadur direolek, arsellet e kleñved Paget. Ar Sz. *corduroy (cloth appearance of a) vertebra* a ra dave da gourzadoù diazerc'h, heñvel ouzh re ar voulouz.

vertébrothérapie ◇ **spondylotherapy** ◇ **mellkeingurañ** Prederiañ laurioù 'zo a 'r mellkein dre gefleuñviñ ar mellennoù.

vertex ◇ **vertex** ◇ **kernboent** g. Poent korfvuzulierezh, anezhañ poent uhelañ ar bolzpen en dalenn greizer a-saezh, ar penn o vezañ dalc'het eeun.

vertige ◇ **vertigo** ◇ **trolern** g. Strafuilh ar c'hempouez naouus dre ur stantad a zistabilded, a gorf pe a endro o treiñ. — **trolern gwazhiedanaezel** (Gl. v. *angiopathique* Sz. *angiopathic* v.): diwar an arterioskleroz mellkein-diazpen. — **trolern loadurel** (Gl. v. *de position* Sz. *positional* v.): o tarvezout pa gemmer loadur, an trolern grezvarrek kuñv o vezañ an hini paotañ. — **trolern darreuziadel** (Gl. v. *épidémique* Sz. *epidemic* v.): trolern dibad gant azoniad poreel a orin viruzel. — **trolern droukfellel** (Gl. v. *épileptique* Sz. *epileptic* v.): furm leiek droukfell, oc'h erzerc'hañ dre ur fatadenn drumm diaraoget gant un trolern kreñv. — **trolern galvaniek** (Gl. v. *galvanique* Sz. *galvanic* v.): diwar gwered ur red tredan untu war gwiennou rakkamb ar VIII^e re, an daou elektrod eus ar pod tredan o vezañ arloet war valegoù ar vrennigenn. Pa vez enstoket ar red, an traoù a hañval fiñval eus ar blein muiel d'ar blein leiel hag ar c'horf a hañval c'hwelañ war an hevelep tu; pa vez distoket ar red, ar c'hwelañ a hañval bezañ durc'haet war an tu gin. Bezañs un trolern ezreol zo arverk ur strafuilh arc'hwelel pe un anaf eus bevned gant ar c'hempouez (kanolioù hantergelec'hiek). — **trolern garloc'hennel** (Gl. v. *laryngé* Sz. *laryngeal syncope*): heñvelster da orc'had garloc'hennel, ezwal pasaat (sl. *ictus laryngé*). — **trolern bredel** (Gl. v. *mental* ou v. *névropathique* Sz. *neurasthenic* v.): enkreuz argalonel, trumm, emouez, didrec'hadus, kevret gant ur santad a goempad hag a fatadur, gant brumenn dirak an daoulagad ha gwelved an dremm. Devoudet e vez gant gwel un draezenn ha arreataet bewech en hevelep amveziadoù. Leteñvelderioù bras ez eus etre an trolern bredel hag an arurioù.

vertige paralysant ◇ **paralyzing vertigo** ◇ **trolern peluzus** Kleñved ansavelet an natur anezhañ (poreel ?) oc'h erzerc'hañ e rezh darreuziadoù bihan kantet kenan (Jura, Japan) hag o wazhañ an dud e diastok ar bovideged (mesaerion, gorgerion, h.a.). Darvezout a ra dre frapadoù, naouus dre c'houseizioù dibad, strafuilhoù gweleled (ptoziz, koabrennegezh, daouwel, gleurinnel, luc'hgaz), a-wechoù strafuilhoù ar c'hempouez ha laurioù mellennel. Kemm a vez lakaet etre tri rizeh: *rizh an enhuned (trolern ptozek)*, *rizh an emzastum* ha *rizh an dall mezv*. Ar c'heñfediñ hag ar stad hollek n'int morse tizhet.

veru montanum ◇ **verumontanum** ◇ **turumell** b. **ar sper** Tosenn greizer, hirvoan a-zerc'h, lec'hiet e par speur adreñv lodenn a-raksavenn ar c'han troazh. El lec'h-se eo e tigor krozhig ar raksavenn hag ar sanioù strinker.

veru montanum: syndrome du ~ ◇ **verumontanitis** ◇ **azoniad** g. **turumell ar sper** Teskad an azonioù devoudet gant ur c'hantroazhfo adreñv gant tanienn turumell ar sper: kevodiñ laurus da gentañ gant derodiñ kenrat ha gwadek, ha goude kevodiñ skort ha dibaot en ervez da zevoudañ blindur an arc'hwelioù ganadel hag an dic'halloud.

vésical ◇ **vesical** ◇ **c'hwezhiellel** aa., **-c'hwezhiell**, **~c'hwezhiell** A-zave d'ar c'hwezhiell.

vésicant ◇ **vesicant** ◇ **klogorennus** aa., **c'hwezhiennus** aa. O tevoudañ c'hwezhiennou, klogorennou, filboc'hennou kroc'h-enel.

vésicatoire ◇ **vesicatory** ◇ **klogorenner** g. Araezad dispredet, telt intret gant kantarid amkanet da zec'han klogorennou.

vésicopustule ◇ **vesicopustule** ◇ **c'hwezhiennburbuenn** b. C'hwezhienn enni un endalc'had o vont linek.

vésicule ◇ **1 vesicle blister** ◇ **1 kellenn** b. **2 c'hwezhienn** b. 1 Termen korfadurezh, organ e stumm ur sac'hig. Da skouer: *kellenn vestl*, *kellenn sper*. 2 Termen kroc'henouriezh, anaf elfennel ar c'hroc'hen, anezhañ ur bos hevonn eus an ezkroc'hen, ul levruzenn voull ennañ.

vésicule exclue ◇ **nonfilling gallbladder** ◇ **kellenn (vestl) skinandemer** Ezvezañs a skindemeradur eus ar gellenn vestl.

vésicule fraise ◇ **strawberry gallbladder** ◇ **kellenn (vestl) sivivanek** Anaf ar gellenn vestl a zo ar speur anezhi, tevaet a-wechoù, strewet war an tal glaourgennel poentoù bihan gwenn arvelen heñvel ouzh akenoù ur sivienn. An imbourc'h gwiaoniel a ziskouez ez eo tonenn asplegoù glaourgenn ar gellenn leun a gelligoù histiokitel sklaer spoumek, paot al lipid enno, a-wechoù kevredet gant strinkennou trenkennoù druz hag esterioù kolesterol. Ur seurtad kolesteroloz eo (sl. *cholestérolose*).

- véscule perlée** ◇ ◇ **c’hwezigenn berlezennek** Filboc’hennou treuzluc’h, bihan evel penn ur spilhenn, war ur ruzder kroc’hen. Emain e penn irvi an hakrez, enno parez ar sarkopt dozvet e vioù ganti. Arsellet e vezont etre ar bizied pergen hag ivez war parzh araok-diabarzh an arzomioù (sl. *gale, scabiès, scabiose, psore*).
- véscule porcelaine** ◇ **porcelain gallbladder** ◇ **kellenn vestl porselen** Razekadur speur ar gellenn vestl hewel war ar skinlunioù andarbar. An neuz-se a erzerc’ha bezoud ur bestlgellennfo henek.
- vesiculectomie séminale** ◇ **vesiculectomy** ◇ **spergellennezvenañ** (sl. *spermatocystectomy*).
- Vesiculovirus** ◇ **Vesiculovirus** ◇ **Vesiculovirus** Genad viruz gougevret ouzh kerentiad ar *Rhabdoviridae* ma renker viruz ar genaoufo c’hwezigennek.
- vespertilio** ◇ **butterfly lupus** ◇ **lupuz g. maskl bleiz** Seurtad lupuz eritematus henek o tinodiñ ent kemparzhek war ar marchodennoù ha war dalbenn kein ar fri, o reiñ neuze neuz ur maskl bleiz, pe hini ur valafenn, pe c’hoazh un askell-groc’hen dispaket he divaskell.
- vessie** ◇ **bladder** ◇ **c’hwezigell b.** Kadaver kaherel lec’hiet e kavenn al lestr ma hogenn ennañ an troazh o tont eus al lounezhi dre ar sanioù troazh, etre an deziouladoù. An troazh a vez karzhet dre ar c’han troazh.
- vestibulaire : syndrome** ~ ◇ **vestibular syndrome** ◇ **azoniad g. rakkambrel** Azoniad oc’h erzerc’hañ dre un nistagmuz, strafuilhoù an diasav, ar c’herzhed hag an tant. A orin kreizel pe drobarzhel eo, e dalc’h un anaf eus ar milendall pe eus lodenn da rakkambrel eus an eizhvet nervenn.
- vestibulaires : épreuves** ~ ◇ ◇ **prouadoù l. (g.) rakkambrel** Amkanet da arwelaat ur strafuilh eus ar c’hempouez e degouezh naouet ar milendall; arglask an nistagmuz emdarzh pe delanket (prouad Bárány, prouadoù c’hweñ ha galvaniek), arouez Romberg, prouadoù an divvrec’h astennet, ar biz yod, ar c’herzhed a-steredenn.
- vestibule** ◇ **vestibule** ◇ **rakkambrel b.** Ec’honenn pe gavenn o reiñ digor d’ur gavenn all, da skouer : *rakkambrel ar gouin, rakkambrel ar genoù, rakkambrel ar c’harloc’henn*.
- vestibulite** ◇ **vestibulitis** ◇ **rakkambrel g.** Tanijenn urv rakkambrel.
- vestibulo-cochléaire : nerf** ~ ◇ **vestibulocochlear nerve** ◇ **nervenn b. gempouez-kleved, nervenn rakkambrel melc’houed-enn** Eizhvet re nervennoù a-glopenn, nervennoù ar c’hleved hag ar c’hempouez.
- vestige** ◇ **vestige** ◇ **aspadenn b.** Krakorgan gant an oadour, a zo gant ar grouell (pe gant ul loen izel) diorreet mat.
- veuve noire** ◇ **black widow** ◇ **intanvez b. du** Anvad boutin ur gevridenn vinimus (*Latrodectus hasselti*).
- VF (électrocardiographie)** ◇ ◇ **VF (kalonvarrwezañ)** Arouez amdreugad unvlein ar c’har gleiz.
- VHA, VHB, VHC, VHD, VHE, VHG** ◇ **VHA, VHB, VHC, VHD, VHE, VHG** ◇ **VHA, VHB, VHC, VHD, VHE, VHG** Viruzoù an avufoioù : A, B, C, D, E, G.
- viabilité** ◇ **viability** ◇ **bevuster g.** Gouested ur grouell da vevañ, ampleget gant un diorreadur reol ha spirus e-doug an enkrozhvezh. Ar peurliesañ e lakaer ned eo ket bevus ur grouell dindan 5 miz.
- viabilité myocardique** ◇ **myocardial viability** ◇ **bevuster ar c’halongaher** Arazegezh tachadoù ’zo ar c’haheer kalon da azgrenaat ur c’hennevid hag arc’hweilioù reol goude un angwazhiad. E andalañ a reer diwar-bouez hentennoù diseurt a galonskin-gannluniñ ha dre arglask gwellaer an argrezad kofig kleiz e-doug ar c’halonstenerluniñ stresel.
- viable** ◇ **viable** ◇ **bevus aa.** En araez da vevañ.
- vibice** ◇ **vibex** ◇ **1 frevellad g. -où 2 stirgennad g.** 1 Arveret ar peurliesañ el liester, anafoù purpurek o tresañ rizennoù pe irvi war ar c’hroc’hen (seurtad pupura). 2 sl. *vergeture*.
- vibrance péricardique proto- ou méso-systolique** ◇ **pericardial protodiastolic sound** ◇ **trouz g. amgalonennel deroù-pe kreiz-sistol** Trouz kalon leteñvel ouzh an trouz amgalonennel deroù-diaistol, merzhet etre an daou drouz kalon avat, e kreiz pe e deroù ar sistol, e degouezh a amgalonennfo razekaus. Devoudet e ve gant krommadur sistolel ar blakenn razek.
- vibrance péricardique protodiastolique ou isodiastolique** ◇ **pericardial proto or mesosystolic sound** ◇ **trouz g. amgalonennel deroù- pe kreiz-diaistol** Arouez selaouennañ arsellet en amgalonennfo amwaskus, kleñved aet dibaot. Un trouz sec’h eo, ur stlak fraoñvus, kalz kreñvoc’h eget an trouzoù bonan, merzhet ent dibarek e rannbarzh kern ar galon. Diastolel eo ent rizhek, keitdiastolel pe deroù-diaistol hervez an aozourion. War a hañval ez eo devoudet gant arsav trumm leugnididezh ar c’hofig ha marteze e degouezhioù ’zo gant froum ar blakenn razek e deroù an diaistol (a se an anvad heñvester *trilamm goudesistol*), dezhañ un hangren metalek ar peurliesañ, alese an anvad roet ivez : *froum amgalonennel*.
- vibration** ◇ **vibration** ◇ **1 froum g., froumad g. 2 daskren g. 3 argreñañ** 1 Loc’h trovezhiel herrek, o vont-dont pe o luskellañ a bep tu d’ur poent kempouez. 2 Froumal merzhet gant palv an dorn harpet plaen war ur rannbarzh eus ar c’horf. — *daskrenoù kofel* (Gl. v. *abdominales*) : merzhet er mare m’emañ ar gouzrec’h o komz. Arouez torliñv en deroù e steuz an daskrenoù pa grog arouez ar c’houmm da vezañ merzhadus. — *daskrenoù bruskel* (Gl. v. *thoraciques*) : merzhet er mare m’emañ ar gouzrec’h o komz. Kreñvoc’h ez int e degouezh douesadur parenkim ar skevent (skeventfo), gwanoc’h pe steuziet e degouezh a fennad liñvel e kavenn ar grezenn (krezennfo) pe aezhel (bruskaezhad). 3 Hentenn leuñviñ, anezhi ur steudad stroñsadennoù herrek devoudet gant an dorn war ur rannbarzh eus ar c’horf, dre bouezadennoù spanaennek arreataet, o chom bepred a-stok ouzh ar c’hroc’hen.

Vibrio ◇ **Vibrio** ◇ **Vibrio** Genad bakteri eus kerentiad ar *Vibrionaceae*, anezho bazhelloù Gram lei, argromm, aerat pe anaerat ha heloc'h diwar-bouez ur skourjezig a-vlein.

Vibrio cholerae ◇ **Vibrio cholerae** ◇ **Vibrio cholerae** Spesad bakteri anaerat anret eus kerentiad ar *Vibrionaceae*, Gram lei, eus 1 µm da 2,5 µm hed, argrommig, en o zibenn ur blevan kreniat ha dezho un heloc'hded vras kenan. *V. ch.*, a vez tifvet aes kenan war veteier ordinal, zo en e furn klasel hag er gouennad **El Tor** gwezher kleñvedus ar c'holera aziat. E-kichen an kez vibriion 0 : 1 rizhad El Tor, ur skod nevez *Vibrio cholerae* 0 : 139 zo bet hennadet. Emañ en orin un darreuziad en India arsellet e 1992 (sl. *choléra*).

vibriion ◇ **vibrio** ◇ **vibriion** g. Garvev gougevret ouzh ar genad *Vibrio*, argromm pe argrommoc'h, blevanek, heloc'h.

Vibrionaceae ◇ **Vibrionaceae** ◇ **Vibrionaceae** Kerentiad bakteri Gramm — anaerat anret, argromm e neuz ur skej, heloc'h, o c'hoarvezout eus ar genadoù *Aeromonas*, *Vibrio* ha *Plesiomonas*, a zo ar spesad rizh anezhañ *Vibrio cholerae* (vibriion kolerek).

vibrisses ◇ **vibrissae** ◇ **blev s. (u : blevenn) fri** Blev lec'hiet e-barzh ar fronelloù.

vibromassage ◇ **vibromassage** ◇ **froumleuñviñ** Leuñviñ dre froumañ, doare merata anezhañ stroñsadoù herrek hag arreet, arloet gant ar bizied ouzh ar parzh korf a leuñver gant an amkan gwerediñ war ar gwiadoù don. O vezañ ma 'z eo skuzhus d'al leuñvour ren hevelep embreg ouzhpenn un nebeut munutennoù, e vez arveret binvioù tredan : froumleuñverioù, ganerioù ussten, h.a.

vibrothérapie ◇ **vibrothérapeutiques** ◇ **froumgurañ** Arver yac'hadel ar froumoù, krouet gant an dorn pe gant ardivinkoù (usstenioù).

vicariant ◇ **vicarious** ◇ **kevelat** aa. A-zivout un organ pe un arc'hwel o parraat ouzh skorted un organ all pe un arc'hwel all.

victimologie ◇ **reuziedouriezh** b. Diskiblezh o plediñ gant studi ar reuzidi, er par bredvezegel ent dibarek.

Vidal : polyarthrite rumatoïde type ~ ◇ ◇ **liesarzfo g. rumatoidel rizh Vidal** Seurtad liesarzfo rumatoidel naouus dre neuz ar bizied angell reunig (sl. *doigts en coup de vent*).

Vidal-Brocq : mycosis fungoïde type ~ ◇ ◇ **mikoziz g. fungoidel rizh Vidal-Brocq** Seurtad mikoziz fungoidel naouus dre vezañs yoc'hennoù hevonn, hep ma ve an dinodadur anezho diaraoget gant al lankadoù ekzematik ha likenek.

Vidal-Jacquet : syndrome de ~ ◇ ◇ **azoniad g. Vidal-Jacquet** Kevreted un arzhfo gonokokel hag ur c'heratoz palv-sol.

vidéocapsule ◇ **videocapsule** ◇ **videoklorenn** b. Gargamera amkanet da vezañ euvret war-benn imbourc'hiñ ar vouzellenn voan ha kas, e-kerz an trehent pervez anezhi, lies skeudenn d'ur paker diavaez douget gant ar gouzviad. Un doare skinbervezen-gweliñ eo (*Sz. wireless capsule enteroscopy*).

vidéochirurgie ◇ **videosurgery** ◇ **videosurjianerezh** g. Kalvezder surjaniel luc'hengweliñ koublet gant ar pellwell.

vidéothoroscopie ◇ **videothoracoscopy** ◇ **videobruskengweliñ** Kalvezder imbourc'h ar flugez enbruskel oc'h arverañ ar c'hrezennwerañ (pe *bruskwerañ*) koublet gant ar pellwel, o kevaraezañ videosurjianerezh ar bruska ha bevsav ar grezenn.

vigilambulisme ◇ **vigilambulism** ◇ **defraouvalerezh** g. Bale diarzoug o c'hoarvezout er stad defroù.

vigilance ◇ **vigilance** ◇ **1 defroù g. 2 kostañ, kost g., kosterezh** g. 1 Arc'hwel o tiogeliñ defroù pluskenn an empenn, ar genskiant hag ar galloudezhioù erwezhiñ; e dalc'h steuñvenn rouedek ar c'hef empenn ha hanteradoù kimiek (dopamin, noradrenalin). Steuzidigezh an defroù a zevoud ar c'homa. 2 Eveshaat gweredoù an araezioù diseurt arveret er yac'haat (sl. *hé-movigilance, matériovigilance, pharmacovigilance*).

VIH ◇ **HIV (Human Immunodeficiency Virus)** ◇ **VIH, HIV, viruz an hangaezvig denel, VIHAD** (sl. *HIV, virus de l'immunodéficience humaine, VIH*).

Villaret : syndromes de ~ ◇ **Villaret's syndromes** ◇ **azoniadoù l. (g.) Villaret** 1 Azoniad an tachad drekkilvoc'henn adreñv gant tizhad untu an IX^t, X^t, XI^t ha XII^t re nervennoù a-glopenn hag azoniad Claude Bernard-Horner. 2 Dinodadur un usvent avu laurus hag un droazhduegezh gant ur gouzrec'h ezklorrennet ul lagad dezhañ (o tougen ul lagad gwer). An triad-se a gevaraez diogeliñ hollekadur ur melanosarkom tolgennek.

villeuse de la vessie : **maladie** ~ ◇ ◇ **kleñved g. bodennaouel ar c'hwezhigell** Anaez naouus dre vezañs papillhomoù niverus kenan enezet war glaourgenn ar c'hwezhigell, o reiñ dezhi un neuz blevek pe vouldouzek.

villeux ◇ **villous** ◇ **1 bodennek** aa., **bodennaouek** aa. **2 bodennaouel** aa. 1 Gant bodennoù. 2 A-zave d'ar bodennoù.

villine ◇ **villin** ◇ **villin** g. Protein enkelligel epitelienn ar pervez. Ar vezañs anezhañ a vez arsellet e-kerz ar c'hankr kolon-youlc'h.

villosité ◇ **villosity** ◇ **bodenn** b. Tosenn vihan neudheñvel, bonan pe gleñvedel, war c'horre ur glaourgenn pe ul levrgenn, o reiñ dezhañ un neuz blevek. Da skouer : *bodennoù ar c'horion, ar bodennoù torzhienn, ar bodennoù pervez*.

vimentine ◇ **vimentin** ◇ **vimentin** g. Protein tantedañvoù ar c'helligoù mezenkimatus (sl. *tonofilament*).

VIN ◇ **VIN (Vulvar Intraepithelial Neoplasia)** ◇ **VIN, nevezweañ ar c'hourzh enepitekel (NEKE)** Nevezweañ ar c'hourzh enepitekel.

Vincent : angine de ~ ◇ **Vincent's angina** ◇ **gorank** g. **Vincent, gorank gouliezlienennek** (sl. *angine de Vincent, angine ulcéromembraneuse*).

Vincent : épreuve de Beth ~ ◇ **Vincent's test** ◇ **prouad g. Beth Vincent** Araezad desavelañ ar rizh gwad, anezhañ meskañ war ul lavnenn wer pe ur follenn gartoñs lufur un dakennig eus ar gwad da imbourc'hiñ gant un dakenn vras eus ar gwadveizoù

stalon A, O ha B, enno a-getep an aglutininoù β , α hag $\alpha\beta$. Dazgludañ an hemati, herrek, a vez gwelet a-veursell pa gejj an aglutinin gwadveizel en hemati an aglutinogen keñverek. Mar bez devoudet gant ar gwadveizoù a 'r rizhoù B hag O, emañ er rizh B; gant an holl wadveizoù, er rizh AB; ma ne zeu an aglutinin war wel e nep lec'h, emañ ar gwad er rizh O.

Vincent : **signe de** ~ ◇ **Vincent's sign** ◇ **arouez b. Vincent** Aneraez en tiriad nervaouet gant nervenn izelañ al logigoù, arsellet en askornmelfo don ar c'haved, gant tizhad an kez nervenn.

Vineberg : **opération de** ~ ◇ **Vineberg's operation** ◇ **oberatadenn b. Vineberg** Ensevadur talmerenn diabarzh ar brusk e kaher ar galon, evel prederiadur goustegus ar skorted kurunerel. Seurt araезд a vez dilezet hiziv. Neoazh, talmerenn diabarzh ar bruska a vez arveret evit dewerc'hañ ur pontadur eus an dalmerenn etre-kofigoù araok.

viol ◇ **rape** ◇ **gwallad g.** Nep sankadur revel embreget war an amgen dre feulster, destrizh pe sebez.

viomycine ◇ **viomycin** ◇ **viomikin g.** Bevastaler gweredus ouzh *Mycobacterium tuberculosis*. En askont d'e bistrigezh e vez arveret hepken e degouezh a harzusted ouzh an eneptorzheleier gweredusoc'h.

VIP ◇ **VIP (Vasoactive Intestinal Peptide)** ◇ **VIP, peptid pervez gwazhiedwezhus** O teanviñ un nervdreuzkaser gwazhiedfrankaus, reoler al loc'hañ pervezel, ar borc'hañ pervezel, kreuzel hag an emborc'hañ ilgreizel. Bezant eo ar VIP er ganol vezhur hogos en he fezh, en ilgreiz, ar vezonuslouezhenn, an nerveg kreiz. An usvorc'h anezhañ zo kiriek da azoniad Verner ha Morrison (sl. *Verner et Morrison : syndrome de* ~).

vipémie ◇ ◇ **gwadvec'h g. VIP, VIPwadvec'h** Bezañs ha bec'h ar VIP er gwad.

vipome ◇ **vipoma** ◇ **vipom g.** Yoc'henn o vorc'hañ ar VIP a-fonn, 80 % anezho en ilgreiz (sl. *azoniad Verner ha Morrison*); ur feokromokitom, ur ganglioneurom, un neuroblastom, ur c'harkinom bronkezel pe ur c'hankr mezonel a 'r skoedenn a c'hell ivez bezañ un arbenn eus un dedaold euzreol a VIP.

Vipond : **signe de** ~ ◇ **Vipond's sign** ◇ **arouez b. Vipond** C'hwarenn hollekaet arsellet e-doug gounervezh poreoù lemm 'zo, evel ar ruzell, ar ruzig, ar jotorell hag ar vrec'h nij. Dinodadur an arouez-se, gant bugale o vevañ en ul lec'h gouziblet, a gevaraez ober un deznauou kentrat ha dredañ e koulz.

viral ◇ **viral** ◇ **viruzel aa., ~viruz** A-zave d'ur viruz.

Virchow : **triade de** ~ ◇ **Virchow's triad** ◇ **triad g. Virchow** Dassav, naoued eus ar speurioù hag uskaouledusted : parennoù kevaraez d'an trombozardarzh.

virémie ◇ **viraemia** ◇ **gwadviruzegezh b.** Bezañs viruzoù er gwad amredat (rez er plasma pe dezouget gant elfennoù luniek 'zo).

viréux ◇ **virous** ◇ **1pistrius aa., kontammus aa. 2 mouezhus aa.** 1 A-zivout ur blantenn kontammus evel an *amanit pistrius*, ar *c'higid pistrius*. 2 A-zivout c'hwez plant pistrius 'zo, pe blazenn un aozad, heugus ha flaerius.

virilissant ◇ **masculinizing** ◇ **gourevus aa.** O tevoudañ dinodadur eilarouezioù revel gourevel (sl. *hyperandrogénie, hyperandrogénisme*).

virilisme ◇ **virilism, virilization** ◇ **gourevegezh b.** Bezañs gant ar venev eus eilarouezioù revel gourevel : blevegezh heñvel ouzh hini ar c'houreved, usteñv an ellig, mizanliñv, ur vehinegezh hollekaet gant stirgennadoù mouk, un uc'heniñv, ur bredadur gourevel, un uswask hag a-wechoù un diabet. Devoudet e vez an azoniad-se gant ur yoc'henn hud eus ar gaenuslouezhenn; dedreiñ a ra en un nebeut mizhvezhioù etrezek ar fallezh hag ar marv; dibaotoc'h e vez e dalc'h un uswe ganedigel an uslouezhennoù. Devoudet e vez ivez gant un adenom bazofil eus ar c'hougorfenn (sl. *Cushing : maladie de* ~, *syndrome de* ~, *hypercorticisme glyocortico-(séro)ïde*) pe, ent nemedennek, gant ur yoc'henn eus ar vierez (arrenoblastom, azoniad Stein-Leventhal). — *gourevegezh vlevel, kreoñegezh* (Gl. v. *pilaire, hirsutisme*) : mideñv ar blev gant ar venev, anezhañ ur c'hourblevegezh a c'hlenadur gourevel, kevret alies gant soavred, diwar usvorc'h hormonou androgen gant an uslouezhenn ha gant ar vierez pergen, hag ivez gant reñver bevezñ an kez hormonou gant o buzerioù blev-soav. E degouezhioù 'zo, seurt reñver bevezñ zo arbenn nemetañ mideñv ar blev (kreoñegezh kentael). — *gourevegezh kentrat* (Gl. v. *précoce*) : sl. *macrogénitosomie précoce, protéléiose, virilisme précoce*.

virino ◇ **virino** ◇ **virino g. -ioù** Rannig c'houlakadennel a ve an arbenn eus an empennoù goulemm spouevanek treuzkasadus hag eus kleñvedoù dic'henezhadel all a 'n nerveg kreiz. Amparet e ve gant un drenkenn nukleek allevek gronnet gant kemplezhioù lipidoprotidek o tont eus an ostiz. An arlakadenn-se zo bet dilezet e gounid hini ar prion (sl. *prion*).

virogène ◇ **virogen** ◇ **virogen g.** Rannig en araez da dreuzkas a-hêrezh ar stlennad rekis da ziwannadur ur viruz.

viroïde ◇ **viroid** ◇ **viroid g.** Gwezher kiriek da gleñvedoù 'zo eus ar struzhennoù, a denn e anv diwar e heñvelded gant ar viruzoù, o tiforc'hekaat diout dre ezvezañs ar c'hapsid. Un drenkenn nukleek (RNA) e ve, gronnet gant ur goc'henn o tont eus ar gellig ma 'z eo c'hoarvezet an azeilañ.

virologie ◇ **virology** ◇ **viruzouriezh b.** Diskiblezh o plediñ gant ar viruzoù.

viroplasm ◇ **viroplasm** ◇ **viroplasm g.** Greunennadoù munud direoliek o tont war wel en dro d'ar c'hraoñelloù, e protoplasm ar c'helligoù poreet gant ar viruzoù. A-ser gant ar rannigoù viruzel arrott hag ar gwiennoù a zo ennañ ez amparont hollad ebarzhennoù protoplasm ar c'helligoù poreet-se.

virose ◇ **virosis** ◇ **viroz g.** Nep kleñved devoudet gant ur viruz.

virulence ◇ **virulence** ◇ **anial g., anialegezh b.** Perzh ar bakteri da nerñ ha da vorc'hañ toksinoù e-barzh ar bevedeg, eleze da vezañ *anialek*, da *anialiñ* ouzh ar bevedeg. Derez an anialegezh a vez andalet hervez grevusted ar strafuilhoù devoudet, harzusted ar bevedeg hervez ar goudrevn hag an delanvadoù kent o deus bet tro da werediñ war ar garvevion.

virulicide ◇ **virucidal** ◇ **viruzlzh aa.** O tispenn ar viruzoù, evel an dilesterioù hgag an dilouezerioù, an dour javell da skouer.

virurie ◇ **viruria** ◇ **troazhviruzegezh b.** Bezañs viruzoù en troazh.

virus ◇ **virus** ◇ **viruz g. -où** Ar viruzoù zo bevedegoù dreistkorrgreskerel, bihanoc'h eget 0,1µm : eus 200 da 300 nm evit ar brasañ viruzoù (psitakoz, brec'h, buvrec'h) ha 10 nm evit ar re vihañ (louetvelfo, terzhienn aftus). Ne c'haller o gwelout nemet diwar-bouez ar c'horrgresker elektronek. Evit bevañ ha nerñ eo ret dezho arvevañ e-barzh ur gellig vev (kellig poreet).

C'hoarvezout a reont eus ur gellig hepken : ur gloenn wareziñ (ar *c'hapsid*) en dro d'ur c'hromozon unel a ampar an dafar hilel anezho, DNA (adenovirus) pe RNA (viruz gant RNA). Ur viruz er-maez eus ur bevedeg bev ne c'hell dreistbevañ nemet un nebeut degadoù munudoù. Ar gellig poreet a c'hell bezañ ur vakterienn, un arvevad pe ur bevedeg lieskellig, evel hini an den. En degouezh diwezhañ, e vo kerc'hus da gelligoù 'zo, kentoc'h eget da reoù all. E-se, viruz ar grip ned eo gwazhus nemet ouzh ar c'helligoù analadel ha viruz an haza ouzh ar c'helligoù gwenn.

Euken kenan eo tiñvidigezh ar viruzoù : enlanañ a reont e dafar hilel ar gellig poreet, o nerñ a-ser ganti. Ar gellig eo a bourchas d'ar viruz kement en deus ezhomm evit nerñ.

Ar pezh a zeu goude zo diouzh an doare ma argerzh ar viruz : 1° Pe e vlosk ar gellig (kelligloezañ), furm lemman ar c'hleñvedoù diwar viruzoù. 2° Pe e treistbev ar gellig o kendaoliñ da zedaoliñ viruzoù nevez (degouezh ar c'hleñvedoù henek eo, evel an eror). 3° Pe e tic'henezh ar gellig (degouezh ar gwenaennoù diwar ar papillomavirus, pe hini kankrou 'zo evel hini gouzoug ar grozh, diwar viruz). Onkogen eo ar viruz neuze.

Evit stourm ouzh ar viruzoù e tanze ar bevedeg antikorfoù hag an andalañ anezho er gwad eo a gevaraez prouñ bezañ ar viruzoù, rak o dinouiñ zo kemplezh, pa vez rekis kaout tiñvadennoù war gelligoù bev (vioù pe rizheloù yar) hag imbours'hiñ gant ar c'horrgresker elektronek.

Araokadennoù e-leizh zo bet graet war an enepviruzeier, hogen e kemm ouzh ar bevastalerioù gweredus kenañ a-enep ar bakteri, n'eus ket kalz a enepviruzeier evit c'hoazh. Evit kleñvedoù grevus evel an haza e kevredet an enepviruzeier e daou-, tri- ha pevaryac'hadur, zoken.

virus A ◇ **viruz A** Viruz an avufo A (sl. *hépatite A, HA*).

virus à ADN (ou à DNA) ◇ **DNA virus** ◇ **viruz gant DNA** Viruz dezhañ un dafar hilel gant trenkenn dezoksiribonukleek (DNA), daouarrevell ar peurliesañ. Evit a sell ar viruzoù denel ez eus anv eus ar c'herentiadoù-mañ da heul : a) kapsid a gemparzhegezh diñsek, hep golo hag eterharzus : *Adenoviridae* (treuzkiz ar virion, 7 090 nm), *Papovaviridae* (45-55 nm) ha *Parvoviridae* (18-26 nm); b) kemparzhegezh diñsek ha goloet : *Herpesviridae* (100 nm) ha *Hepadnaviridae* (42 nm), ha c) kemparzhegezh kemplezh ha goloet : *Poxviridae* (230-300 nm).

virus à ARN (ou à RNA) ◇ **RNA virus** ◇ **viruz gant RNA** Viruz dezhañ un dafar hilel gant trenkenn ribonukleek (DNA), unarrevell ar peurliesañ. Evit a sell ar viruzoù denel ez eus anv eus ar c'herentiadoù-mañ da heul : a) kapsid a gemparzhegezh diñsek ha hep golo : *Picornaviridae* (20-30 nm) ha *Reoviridae* (70 nm); b) kemparzhegezh diñsek ha gant golo : *Togaviridae* (40-60 nm) ha *Flaviviridae* (40 nm); c) kemparzhegezh ulidrek ha goloet : *Orthomyxoviridae*, *Paramyxoviridae*, *Arenaviridae*, *Bunyaviridae*, *Coronaviridae* ha *Rhabdoviridae*, ha d) kemparzhegezh kemplezh ha goloet : *Retroviridae*.

virus : réservoir de ~ ◇ **reservoir of virus** ◇ **mirva g. viruz** Loen pe metoù diavaez ma vez miret an hadenn gleñvedus, da skouer : ar c'hi evit an derzhienn vorkreizet, ur razh evit terzhienn Lassa, logod ar maezioù evit terzhienn ar parkeier, ar priadoù evit ar serk.

virus Avalon ◇ **Avalon virus** ◇ **viruz Avalon** Arbovirus eus ar genad *Nairovirus*, kerentiad ar *Bunyaviridae*, trezouget gant tarlack oc'h arvevañ war evned mor 'zo, hag en ervez da vezañ, gant an den, en orin liesgwiziennfoioù.

virus Banzi ◇ **Banzi virus** ◇ **viruz Banzi** Flavivirus trezouget gant ar moustiked ha kiriek da anaezioù nes d'an deng, arsellet en Afrika ar su hag ar reter.

virus de Bittner ◇ **Bittner's virus** ◇ **viruz Bittner** Viruz kiriek da yoc'hennoù ar vronn gant al logodenn, trezouget d'ar menn gant laezh ar vamm.

virus BK ◇ **BK virus** ◇ **viruz BK** Seurtad *polyomavirus* goubaret gant un hangaeastaleg. Paot kenan eo er boblañs, o revout er furm enkelat e kelligoù al lounezhi, el limfokit hag er monokit. Kiriek eo, gant an hangaeastaleion, da boreadoù ha da c'hwitadennoù eus treuzplantadur al lounezh : gwennempennfoioù liesannon argammedek, tizhadoù ar forzhioù troazhañ (lounezho pibellentremzel, c'hwezhegellfo gwadliñvel gant an dreuzplantidi).

virus Cocksackie ◇ **Cocksackie virus** ◇ **viruz Cocksackie** Anvad ur stroll viruzoù eus kerentiad ar *Picornaviridae*, genad *Enterovirus*, gwezherioù kiriek da anaezioù diseurt gant an den : pilhonfoioù, kleñved Bornholm, herpangin, kalongaherfo, amgalonnennfo, kaherostoù. Reoù zo eus ar viruzoù-se a vez tiñvet war logod nevezoc'h hanet hepken. Ar viruz kentañ eus ar stroll-se zo bet goubaret e Cocksackie (Stadoù-Unanet) e 1947, en oulennoù gouzrec'hioù tizhet gant al louetvelfo araok goulemm, ma oa kevredet dre zegouezh ar viruz Cocksackie gant hini al louetvelfo. Kemm a lakaer etre ar *viruz Cocksackie A* kiriek d'an herpangin, da anaezioù

ar forzhioù anañ, da avufoioù, da zispuilhadoù kroc'hen, da bilhonfoioù limfokitel hag ar *viruz Coxsackie B*, gwezher ar gaherost darreuziat, anaezioù analadel, eksantemoù, darc'hoalioù, tizhadoù kalon ha nervennoù ha marteze kammneuziadoù.

viruz défectif ◇ **defective virus** ◇ **viruz amwerc'h** Viruz o tremen dre ur c'hor soc'hus, goude bezañ entoet en ur gellig : dic'houest eo da gevanekaot ouzh dafar hilel ar gellig ostiz ha d'e strafuilhañ, nemet ha tennañ a rafe korvo eus skoazell un viruz all. Da skouer ar *gwezher delta* a zo an neriñ anezhañ kevaraezet gant ar c'henboreañ dec'hanet gant viruz an avufo B.

viruz Dugbe ◇ **Dugbe virus** ◇ **viruz Dugbe** Nairovirus afrikat trezouget gant an tarlask ha kiriek da anaezioù terzhiennek.

viruz EBV ou **Epstein-Barr (EBV)** ◇ **Epstein-Barr virus**, **EBV** ◇ **viruz Epstein-Barr**, **EBV** Viruz gougevan ouzh kerentiad an *Herpesviridae*, iskerentiad ar *Gammaherpesvirinae*, genad *Lymphocryptovirus* dizoloet gant Epstein ha Barr e 1964 e limfom Burkitt hag adkavet e Susina gant ar gouzrec'hioù tizhet gant kankr ar fric'hargadenn, kenttuet a-hêrezh marteze, ha goude e-kerz ar mononukleoz poreel (Henle, 1967). An EBV a wazh hanbarek al limfokit B. E zinoñ a reer dre diñvañ al limfokit hag arglask an antikorfoù. Poreañ a ra kalz gouzrec'hioù, alies en ur furm diazon, bugale ar broioù izel o barr bevañ pegen. A-wechoù e vez kevredet gant kleñved Hodgkin (sl. *fatigue chronique, maladies des uypies* ha *Purtilo : syndrome de ~*).

viruz Ebola ◇ **Ebola virus** ◇ **viruz Ebola** Viruz rummet, da gentañ e-touez ar *Rhabdoviridae* ha goude e kerentiad ar *filoviridae*, kiriek da derzhiennoù gwadliñvus dezho un daolenn nes da derzhienn Lassa.

viruz Ebola : maladie à ~ ◇ **Ebola virus infection** ◇ **kleñved diwar viruz Ebola** Pore dinodet e Soudan e Gouere 1976 ha damc'houde er C'hongo, ez-Zair (Kongo belgiat). Heñvel eo ouzh kleñved diwar viruz Marburg, gant gwadliñvoù ha दौरisvec'h. Tredizhus kenan eo, o wazhañ ar c'hoskor mezegañ, en ardizh bras. Darvezout a ra ar marv en ouzhpenn an hanter eus an degouezhioù war-dro an 9^e deiz (sl. *fièvre hémorragique épidémique*).

viruz fixe ◇ **fixed virus** ◇ **viruz fest** Viruz dewerc'het dre enkoriñ konnar ar straedoù d'ar c'honikl, heuliet gant un niver bras a dremennoù eus konikl da gonikl. Da neuze e c'houez ar viruz un anialegezh digemm ha gounervezh ar *gonnar armodva* — kleñved danzeet evel-se — a zeu da vezañ fest o padout eus 6 da 7 devezh. Seurt fested a 'r viruz zo dieltro ha trebadek.

viruz H₂N₂ ◇ **H₂N₂ virus** ◇ **viruz H₂N₂** An isrith H₂N₂ a ra dave d'an daou antigen bezant war c'horre ar viruz : an hemaglutinin rith 2 hag an neuraminidaz rith 2. Viruz ar grip A zo ur viruz RNA unarrevell a vleinegezh leiel gant ur genom hanrannek (8 hanrann) gougevan ouzh ar genad *Alphainfluenzavirus* us ar c'herentiad *Orthomyxoviridae*. An isrith H₂N₂ zo bet gousellet e-pad pell da vezañ en orin ar bedreuziad grip ar bloavezioù 1889-1890, hogen an isrith H₃N₂ eo ar gwezher kiriek an tebekañ. Viruzoù H₂N₂ o deus dargenet e skodoù daskanet, en o zouez skod ar grip aziat etre 1956 ha 1958, viruzoù ar grip A (H₃N₂) ha skodoù all c'hoazh a gaver gant an evned.

viruz H₅N₁ ◇ **H₅N₁ virus** ◇ **viruz H₅N₁** Seurtad viruz ar grip eus ar rith A, kiriek en Azia d'ur milzarreuziad grip an evned a-c'houde 1997.

viruz de Hantaan ◇ **Hantaan virus** ◇ **viruz Hantaan** Viruz gant RNA kiriek da derzhienn Korea. Gougevan eo ouzh kerentiad ar *Bunyaviridae*. Kiriek eo ar genad *Hantavirus* da derzhiennoù gwadliñvus niverus darreuziadek gant azoniad lounezhel.

viruz JC ◇ **JC virus** ◇ **viruz JC** Seurtad *polyomavirus* goubaret gant gouzrec'hioù tizhet gant ar gwennempennfo liesannon argammedek. Onkogen eo an kez viruz gant al loen.

viruz lents : **maladies dites à ~** ◇ **slow virus diseases** ◇ **kleñvedoù gorrek diwar viruzoù** Kleñvedoù studiet gant Sigurdsson e 1954, anezho anaezioù a lakaer viruzoù diseurt, anhennadet ar peurliesañ, da vezañ kiriek dezho. Nes eo an anaezioù-se evit an arbennoù-mañ da heul. Da gentañ e stader un hir a brantad hep azon, eus un nebeut mizvezhioù d'un nebeut bloavezhioù. Da c'houde e tizh ar viruzoù kiriek d'ar c'heñvedoù gorrek ur gwiañ pe un organ hepken, an nerved kreiz, da skouer. An trede naouster boutin da seurt viruzoù zo o c'herc'husted, digen evit spesadoù loenel 'zo. Hag erziwezh e tedro ent argammedek an anaezioù angorzhet gant ar c'herentiad viruzoù-se etrezek marv ar gouziviad. Ne ouzer ket resis perak e pad keit all gounervezh ar viruzoù-se. Evit lod eus an arbennergourion e ve ur raktued hilel hag ivez un doare dibarek da erwezhañ a-berzh an herberc'hier poreet. *ICRON* (diwar bennlizherennoù an *Institute for Cancer Research*) zo un termen kinniget gant Blumberg evit deañviñ un unvez amparet gant ar viruz ha parzhioù o tont eus e herberc'hier. Ar c'heal a *ICRON* zo bet danzeet diwar viruz an avufo B, dezhañ ur golo desellet evel an antigen Aostralia hag ar viruz e unan o c'hoarvezout eus un niver bennak a antigenoù o tont eus ar gouzrec'h, m'en deus tiñvet ar viruz (sl. *icron*). Ar c'hleñvedoù gorrek diwar viruzoù zo paot kenan gant al loen. Menegomp : *empennaoued spouevanek ar bioù* (ESB, 1986), *krenion an deñved*. Evit an den zo en ervez da vezañ poreet gant pevar "viruz" a 'r rith-se : *kleñved Creutzfeldt-Jakob*, ar *gwennempennaoued liesannon argammedek*, ar *c'hourou*, ar *gwennempennfo sklerozus goulemm*. A-douez ar viruzoù-se e ranker lakaat kemm etre ar gwezherioù pore kendivizadel, evel hini ar *gwennempennfo sklerozus goulemm*, ha hini *kleñved Visna-Maëdi* (Kleñved an deñved diwar viruz, oc'h erzerc'hañ gant al loened a ouzhpenn 2 vloaz oad gant ur skeventfo henek) hag ar gwezherioù ankendivizadel evel ar prionoù pe ar virinoioù. Bez' ez eus ur c'hevarguz etre ar viruzourion evit a sell anaezioù 'zo evel *kleñved Parkinson dianempennfo*, ar *skleroz strewek*, *kleñved Alzheimer*, *kleñved Steele*, *Richardson* ha *Obszewski*, *kleñved Alpers*, ar *skleroz kostezel kaheisteñvus* ha kankroù 'zo zoken. E gwir e chomer en entremar a-zivout roll an kez "viruzoù" evit a sell an anaezioù diseurt-se.

viruz de Marburg : **maladie à ~** ◇ **kleñved diwar viruz Marburg** Terzhienn wadliñvus Marburg zo ur c'hleñved grevus, gant ur feur trankañ uhel ha devoudet gant ur viruz eus an hevelep kerentiad hag an hini a zo en orin terzhienn wadliñvus diwar viruz Ebola. Arsellet gant ar c'horrgresker elektronek ez anad ar rannigoù viruzel evel edañvoù hirvoan o punañ a-wechoù e stummoù iskis, alese anvad ar c'herentiad : ar *Filoviridae*. Emaint e-touez ar gwezherioù kleñvedus anialekañ evit an den a anavezet. Hag int devoudet gant daou viruz kevarall ez eo hogos dic'hallus dispartiañ an daou gleñved ent klinikel. Dibaot int, met en ervez emaint

da zevoudañ kaouadoù mantrus, kevredet gant ur feur trankañ uhel. En tremened, ne oa bet dedennet evezh an aotrouniezhoù yec'hed gant an kez kaouadoù, nemet adalek ar mare m' o doa diarbennoù ankevezas da stourm ouzh ar pore muiaet an treuzkas er yec'hedioù. N'eus na vaksin na mezegadur evit an daou gleñved-se. Daoust da imbours'hioù don e-pad bloavezhioù, gant prouadoù war gantadoù a loened, a amprevaned hag a blantennoù, n'eur ket deuet a-benn da hennadiñ ur mirva loened pe ur vammenn amvael evit hini ebet eus an daou virus. Kizidik eo ar marmouzion ouzh ar pore, met n'o seller ket evel ur mirva bezus, dre an arbenn ma varv buan kenan hogos an holl loened poreet evit ma treistbevef an viruz.

Ne lakaer ket an denion evel bezant er c'hor treuzkas naturel, o vezañ ma 'z eo darvoudel o foreadur. Kaouadoù ha degouezhioù skignek eus ar c'hleñved diwar viruz Marburg zo bet ditouret en Ouganda, e Republik demokratel ar C'hongo, e Kenya hag e Suafrika (gant ur gouzrec'h o tont eus Zimbabwe). Ar c'haouadoù kentañ, en Alamagn hag e Yougoslavia e 1967, zo bet liammet gant imbours'hvaoù o labourat war marmouzion glas affrikat (*Cercopithecus aethiops*) enporzhiet eus Ouganda. Treuzkas ar viruz eus un den d'unan all a c'houl ur stekiñ tost kenan gant ur gouzviad tizhet. Emañ ret bezañ e diastok gwad pe liñvennoù bevedel (oulennoù, c'hweladoù, troazh, halv, borc'hadoù analadel), dreist holl mar bez gwad enno ha mar bez uhel bec'h ar viruzoù. Evit ar sper a c'hell treuzkas ar viruz betek seizh sizhunvezh war-lerc'h ar pare klinikel. An tredizhañ dre stekiñ dargouezhel a vez dibaot kaer, pezh a laka da soñjal ned eo ket gwerc'hek an treuzkas dre aerosolioù ec'hanalet, na pa c'hoarvezfe zoken. N'eus treuzkas ebet e-doug ar gounervezh, ha hañvalout a ra ar c'houziviaded bezañ an tredizhusañ e-doug bogvezh ar c'hleñved, ma tarvez erzerc'hadoù gwadliñvel. Ar stekiñ nes gant ur c'hlañvour tizhet grevus, e-doug an arouelioù er gêr pe en ospital, hag ivez pleustrou kañv, a vez an hentoù tredizhañ boutin. Pa c'hoarvez an treuzkas dre an dafar ensinklañ pe enokadoù a-zarvoud e vez grevusoc'h ar c'hleñved, ha disleberañ a ra ar stad buan uheloc'h emañ ar mervel en ervez da vezañ.

virus Mayaro ♦ **Mayaro virus** ♦ **viruz Mayaro** Alfaviruz goubaret e 1954 o tevoudañ e Suamerika terzhiennoù gant arzost heñvel ouzh an deng.

virus Nipah ♦ **Nipah virus** ♦ **viruz Nipah** Paramiksovirus kiriek da empennfoioù marvus, arsellet gant desaverion voc'h Malaysia, ha goude gant implijidi al lazhtioù moc'h e Singapour abaoe 1997. Kerentiet eo gant viruz Hendra, kevarall dioutañ avat.

virus Norwalk ♦ **Norwalk virus** ♦ **viruz Norwalk** Viruz gant RNA bihan kenan (27 nm) hep golo, gwech rummet e-touez ar *Calmicivirus*, gwech e-touez ar *Parvovirus*; kiriek eo da greuzpervezfoioù lemm darreuziadek (e Norwalk, Ohio, Stadoù-Unanet, e 1969, da skouer). Adalek 2003 en en rummer e-touez an *Norovirus*.

virus oncogène ♦ **oncogenic virus** ♦ **viruz onkogen** Viruz en araez da gankrekaat pe leukemekaat ur gellig emañ o poreañ dre enteñ e zafar hilel en ur c'hromozom anezhi. Seurt daskemmad eus he glad hilel a strafuilh kennevid ar gellig ostiz, e doare ma 'z ay antrevnek, e-lec'h chom bonan ha reoliek, o telankañ neridigezh antrevn kelligoù, dezho un anrizegezh neuziadurel hag arc'hwelel oc'h erzerc'haat o yuted. Viruzoù gant RNA (retroviruzoù) zo arbenn leukemiezhoù ha kankroù gant al loened; gant an den, viruzoù 'zo gant DNA eus ar stroll eror (viruz EB, kerentiad an *Herpesviridae*) zo bet kavet kevredet gant kankroù hag emañ viruz an avufo B o tasperzhiañ e dinodadur kankr an avu. — Paot kenan eo ar viruzoù onkogen; en araez emaint da chom enkelat e pad hir amzer er bevedeg; neridigezh kelligoù yut a vo delanket da-geñver ur poread viruzel nevez, ur skinatadur, ur c'heraez gant un aozad kimiek kankreiat, un dizurzh hormonel pe hangael (sl. *virus, transcriptase, Retroviridae, provirus, exovirus, endovirus*).

virus Oropouche ♦ **Oropouche virus** ♦ **viruz Oropouche** *Bunyavirus trezouget gant ar moustiked ha kiriek da naouedoù nes d'an deng arsellet e Brazil.*

virus orphelin ♦ **Orphan virus** ♦ **viruz emzivat** Viruz hennadet, dianav e gleñvedusted avat (sl. *echovirus, virus ECHO*).

virus ourlien ♦ **Myxovirus paroditis** ♦ **viruz ar jotorell** Spesad viruz eus ar genad *Paramyxovirus*, kerentiad ar *Paramyxoviridae*, kiriek d'ar jotorell.

virus para-influenza ou parainfluenzæ ♦ **parainfluenza virus** ♦ **viruz parainfluenza** Viruz eus ar genad *Paramyxovirus*, kerentiad ar *Paramyxoviridae*. Lakaat a reer kemm etre pevar rizh. Gwezherioù arbennel eus anaezioù analadel eo.

virus Powassan ♦ **Powassan virus** ♦ **viruz Powassan** *Flavivirus en ervez da zevoudañ empennfoioù, ditouret e Kanada hag er Stad New York.*

virus Puumala ♦ **Puumala virus** ♦ **viruz Puumala** Spesad *Hantavirus* kiriek da derzhiennoù gwadliñvus gant azonid lounezhel (sl. *virus de Hantaan* ha *néphropathie épidémique*).

virus respiratoire syncytial (VRS) ♦ **respiratory syncytial virus** ♦ **viruz analadel sinkitel** Viruz gougevret ouzh ar genad *Pneumovirus* eus ar c'herentiad ar *Paramyxoviridae*, kiriek d'an darn vrasañ eus skeventadoù ar vugale. Deznaou an anaez-se a c'hell bezañ dervaet dre un dazgwered lenañ a 'r glokaenn gant ar gwadveiz (sl. *bronchopneumopathie de type viral*).

virus Rocio ♦ **Rocio virus** ♦ **viruz Rocio** Viruz trezouget gant ar moustiked ha kiriek da empennfoioù arsellet e Brazil e 1975.

virus Ross River ♦ **Ross River** ♦ **viruz Ross River** Togaviruz eus ar genad *Alphavirus* trezouget gant ar moustiked, kiriek d'ul liesarzh terzhiennek darreuziat arsellet en Aostralia.

virus des rues ♦ **street virus** ♦ **viruz ar straedoù** Viruz konnar ar straedoù (sl. *rage*).

virus SEN ♦ **SEN virus** ♦ **viruz SEN** Viruz kerentiet gant ar viruz TT, a ve kiriek da avufoioù.

virus de Sendai ♦ **Sendai virus** ♦ **viruz Sendai** *Myxovirus parainfluenzæ 1* kiriek e 1953 da skeventfoioù darreuziadek mabanel grevus e Japan.

virus de Sindbis ◇ **Sindbis virus** ◇ **viruz Sindbis** Spesad viruz gougevanet ouzh ar genad *Alphavirus*, kiriek da derzzienn diwar ar virus Sindbis.

virus Tacaribe ◇ **Tacaribe virus** ◇ **viruz Tacaribe** Viruz gougevanet ouzh ar genad *Arenavirus* en deus devoudet un tredizhañ imbourc'hva. E-touez stroll ar viruz Tacaribe emañ ar viruzoù Junin ha Machupo.

virus TTV ou TT ◇ **Tranfusion Transmitted virus, TTV virus** ◇ **viruz TTV pe viruz treuzkaset e-ser treuzskuilhañ (VTT)** Viruz gant DNA, kiriek da avufoioù dianskuilhadel nann A-G. Treuzkaset e vez ivez dre an hent monel-genaouel.

virus varicelle-zona (VZV) ◇ **varicella-zoster virus** ◇ **viruz brec'h nij-senkl** Viruz eus kerentiad an *Herpesviridae*, gwezher ar vrec'h nij hag ar senkl.

virus-vaccin ◇ ◇ **viruz vaksin** Viruz blinaet a-walc'h evit bezañ arveret evel ur vaksin ergurañ, da skouer a-enep ar gonnar, an tifuz, an dorzhellegezh (BCG).

virus Zika ◇ **Zika virus** ◇ **viruz Zika** Flavivirus trezouget gant ar moustiked ha kiriek da naouedoù nes d'an deng arsellet en Afrika du.

viscéral ◇ **visceral** ◇ **1 flugezel aa. 2 a-flugez** 1 A-zave d'ar flugez. 2 Termen korfadurezh : e-kefin ar flugez.

viscérale : crise ~ ◇ **visceral fit** ◇ **barrad g. flugezel** Erzerc'had frapadek, laurus ar peurliesañ, o wazhañ organoù diseurt e-doug an tabez.

viscéralgie ◇ **visceralgia** ◇ **flugezost b.** Anvad rumm strafuilhoù kizidigezh ar flugez a orin nervel.

viscère ◇ **viscus (l. viscera)** ◇ **flugezenn b. -où, flugez s.** Nep organ endalc'het en ur gavenn eus ar c'horf : kavenn ar brus (kalon, skevent), kavenn ar c'hof (stomok, avu, felc'h, h.a.), melglog (mel penn).

viscosité ◇ **viscosity** ◇ **gludegezh b.** Harz diwar ar rimiñ etre molekul un heverenn, oc'h enebiñ ouzh ar morloc'h anezho an eil re e-keñver ar re all.

vision ◇ **vision** ◇ **1 gweled g. 2 rambre g.** 1 Embreg skiantenn ar gwelout; perzh al lagad da verzhout ar gouloù, al livioù hag ar stummoù. 2 Trezerc'h gweledel.

visiteur médical ◇ ◇ **gweladenn g. mezegel** Derc'houezour kenwerzh an ijinerezh lael, en e gefridi reiñ ditouroù d'ar vezeion hag o c'huzuliañ en o erskrivadurioù brientaozadù lael.

vissage ◇ ◇ **biñsañ, biñsador g.** Ebarzhiñ biñsoù e tammoù un askorn torret, war-benn o derc'hel e diastok.



visuscope ◇ **visuscope** ◇ **vizuskop g.** Oftalmoskop o kevaraezañ bannañ ur steredenn du war al luc'hsae hag o talvezout da vezegañ ar bouc'hwel.

Vitale : carte ~ ◇ ◇ **Kartenn b. Kretadur Kleñved Vitale (kartenn KKK pe kartenn 3K)** Kartenn elektronek un diogeled o kevaraezañ e bivadiñ hag ivez lakaat an trevnad SESAM da arc'hwelañ (sl. *SESAM*).

Vitallium® ◇ **Vitallium** ◇ **Vitallium, vitaliom g.** Kendeuzad krom ha kobalt amkanet da zedalvezadurioù dentouriel ha surjianeel diseurt (osodoù, binvioù).

vitamine ◇ **vitamin** ◇ **vitamin g.** Anvad hollek an danvezennoù bevel bevret da gresk ha da arc'hwel an organoù, degaset evit an darn vrasañ anezho gant ar boued a gementadoù bihan, pa n'emañ ket ar bevedeg evit o bevenaozañ, an negez anezho o tevoudañ strafuilhoù naouus (avitaminozioù hag isvitaminegezhioù). Diseurt kenan eo o gweredezhioù, vitaminoù zo o tasperzhiañ e danzeidigezh hormonoù hag enzimoù, pe o kevaraezañ an enaoz anezho, pe o vont war-eeun en o c'henaoz kimiek. Ar vitaminoù a orin boueddel a vez rummet evel-henn : a) Ar **vitaminoù druzenn-dileizh** : vitamin A, vitamin D, vitamin E, vitamin K; b) ar **vitaminoù dourzileizh** : vitaminoù ar stroll B hag ar vitamin C.

vitamine A ◇ **vitamin A** ◇ **vitamin A** Vitamin druzenn-dileizh bevret da ziorreadur ha da arc'hwel ar gwiaed epiteled. An dasperzhiadur anezhañ er gweled zo muiel (moug al luc'hsae). An negez anezhañ a zevoud un treweañ keratinaus eus an epiteliennoù (kevresaefo, kornaevlodad, takad Bitot, bouc'hwel issked, kroc'hen sec'h ha garv). Kavet e vez ar vitamin A el laezh, an amanenn, avu lies loen, ar vioù, ar beotez, ar pinochez, h.a. Bez' ez eus div furn : ar vitamin A₁ pe *retinol* hag ar vitamin A₂ pe *dehidroretinol*



vitamine D ◇ **vitamin D** ◇ **vitamin D** Vitamin druzenn-dileizh o tasperzhiañ er c'hennevid fosfor-kalkiom. Kevaraezañ a ra ar sugañ pervezel halioù kalkiom ha fosfor. An negez anezhañ a zevoud lec'h, istant kaherel ha stagellel hag askornvlodad. An usvec'h vitamin D a zevoud un darc'hoal, un treutadur hag ur reñver askornaat. Bez' ez eus div furn a vitamin D : ar vitamin

D₂ pe *ergokalkiferol* (pe *kalkiferol*) a orin struzhel hag ar vitamin D₃ pe *kolekalkiferol* a orin loenel, bevenaozet e-barzh an derm dindan wered ar skinad dreistmouk B (sl. *calciférol*, *ergocalciférol* ha *cholécalficérol*).

vitamine K ◇ **vitamin K** ◇ **vitamin K** Vitamin druzenndeilezh bevret da vevenaot ar protrombin, ar barenn VII, ar barenn IX hag ar barenn X en avu. Erzerc'hañ a ra an negez anezhañ dre ur raktued d'ar gwadliñvoù. E gavout a reer el luzern, an delioù glas, en eouliou struzhel. Bez' ez eus ar *vitamin K*₁ a orin struzhel anvet ivez *fillokinin*, ar *vitamin K*₂ pe *menakinon*, enaozet gant bakteri ar pervez hag ar *vitamin K*₃ kevanaozel, anvet ivez *menadion* (sl. *antivitamine K*, *AVK*).

vitaminisation ◇ **vitamin enrichment** ◇ **vitaminañ** Arfonnañ ur boued pe un danvezenn liael gant vitamin.

vitaminologie ◇ **vitaminology** ◇ **vitaminouriezh** b. Diskiblezh o studiañ ar vitaminou.

vitaminothérapie ◇ **vitaminotherapy** ◇ **vitamingurañ** Arver yac'hadel ar vitaminou.

vitellus ◇ **vitellus** ◇ **kadoan** g. Teskad an danvezennoù arboell dastumet e-barzh an ovokitenn, amkanet da vezhur ar rizhell.

vitesse circulatoire : mesure de la ~ ◇ **measure of circulation time** ◇ **muzuliañ tizh amred ar gwad** Tizh an amred bloc'hel a vez desavelet dre vuzuliañ ar padvezh etre sankadur un aozad prouad en ur wazhienn drobarzh hag an erzerc'hadur anezhañ en ur poent pell eus ar wazhiadurezh, da skouer : blaz un aozad saourek pe eter, un erwezh bevedel resis, pe dinod ul livrezh gant ar fluoreskein.

vitesse moyenne de raccourcissement des fibres cardiaques ◇ ◇ **tizh keitat berradur ar gwiennoù kalon** Ditourenn digonusted ar c'hofig kleiz e-doug lankad an diflistrañ. Emañ e dalc'h an argrezusted hag ivez ar goudekarg. Jedet e vez hervez ar reollun-mañ :

$$VCF = (DTD - DTS/DTD) / Tej,$$

Gant VCF : tizh keitat berradur ar gwiennoù kalon ; DTD ha DTS, a getep : treuzkiz kehederel dibenn-diaistol ha dibenn-sistol ar c'hofig kleiz ha Tej : padvezh an diflistr muzuliet adalek arhent ar gwask aortek. Dewerzhed eo an tizh e s⁻¹.

vitiligo ◇ **vitiligo** ◇ **vitiligo** g. Milivegad naouus dre plakennoù anlivegat, hevonn, en dro dezhañ un tachad gourlivegat. Dianav eo an arbenn anezhañ.

vitrectomie ◇ **vitrectomy** ◇ **gweregezvenañ** Dazbidañ surjanel ar c'horf gwerek, darnel pe hollel pe enbenañ an naskoù engwregel kleñvedel.

vitréotome ◇ **vitrectomy** ◇ **gweregezvenañ** Ardivink arbennik da wezhiañ ar gweregezvenañ, outañ ur sont kentañ o kev-araezañ didroc'hañ ha suc'hañ ar gwereg, hag ivez un eil sont oc'h erlec'hiañ ul liñvenn vevedel ouzh ar gwereg suc'het.

vitronectine ◇ **vitronectin** ◇ **vitronektin** g. Glikoprotein ar plasma hag ar gwiad kenglenel, nes d'ar *fibronektin*, gant an un perzhioù.

vitropression ◇ **vitropression** ◇ **gwerennwaskañ** Araezad a c'hoarvez a bouezañ ul lavnenn wer war ar c'hroc'hen e par un anaf war-benn e zisgwadañ, arveret evit resizañ an deznaou e kroc'henadoù 'zo.

vivisection ◇ **vivisection** ◇ **bevskejañ**, **bevflañchañ** Evit ur gwezh mezegel, eleze prederiañ ha dizoleiñ arbenn ur marv, e reer a-getep gant *diskejañ* ha *kelanskejañ*, hogen evit ur gwezh emvennet imbours'hel, eleze anavezout, prouadiñ, e reer gant *bevskejañ*, *bevflañchañ*, ar rakger *bev-* o kreizennañ an erdalva war ar bev.

VL ◇ **VL** ◇ **VL** Arouez amdregad unvlein ar vrec'h kleiz (sl. *dérivation*).

Vogel-Minning : test de ~ ◇ **Vogel-Minning reaction** ◇ **prouad g. Vogel-Minning**, **dazgwered g. Vogel-Minning** Dazgwered amkanet da lakaat war wel bezañ antikorfoù spesadel gant gouzrec'hioù tizhet gant bilarzioz ; gwadveziz ar glañvourion-se, lakaat e diraez kerkerioù *Schistosoma mansoni*, a zevoud en dro dezho furmadur ul lienenn.

Vogler : méthode de ~ ◇ **Vogler's method** ◇ **hentenn** b. **Vogler** Kalvezder leuñviñ an amaskornenn war-benn dislauriñ.

Vogt : dystrophie cornéenne en mosaïque de ~ ◇ **Vogt's dystrophy** ◇ **mideñv g. tezellek ar gorsae** Mideñv hêrezhel familhel, treuzkaset er mod trec'hok aotozomek, amparet gant ur strewad greun razek loet e parzh kreiz ar gorsae.

Vogt : syndrome de Cécile et Oscar ~ ◇ **Vogt's syndrome** ◇ **azoniad g. Vogt** Seurtad ganedigel ha mabanel a seizi gaouhirvelel, naouus *ent neuziadurel* dre stad varmorvaneke ar rizeneg (gronn lostek ha rann diavaez — kloenn — ar gronn ferek, hep kelligoù) ; *ent klinikel* dre ur stad andagel eus kigennoù an dremm (genglav), eus ar c'hargadenn (brelonk), eus ar c'harloc'henn (migevaot) hag eus an izili (loc'hadou atetozek hag ustant), hep strafuilhoù eus ar meiz nag eus ar gizidigezh.

Vogt-Hueter : point de ~ ◇ **Vogt-Hueter point** ◇ **poent g. Vogt-Hueter** Poent hanbarek evit trepanañ ar c'hlopenn e degouezh a fennad gwad enklouenn daerazel, loet e poent kenskej ul linenn a-zremm o tremen daou dreuz biz a-us da wareg ar voc'h hag ul linenn a-zerc'h o tremen daou dreuz biz a-dreñv baleg a-dal an askorn boc'h.

Vogt-Koyanagi : syndrome de ~ ◇ **Vogt-Koyanagi syndrome** ◇ **azoniad g. Vogt-Koyanagi** Aneaz dianav an natur anezhañ, nes da gleñved Harada, naouus dre gevreted vitiligo, un diwaoutad padennek, dislivadur ar blev, bouzarded ha strafuilhoù lagadel grevus (gwazhiedsaefo araok kentrat daoudu, a-wechoù diflosk al luc'hsae, glaokom lemm, ferennlug).

Vohwinkel : syndrome de ~ ◇ **Vohwinkel's syndrome** ◇ **azoniad g. Vohwinkel** Seurtad keratoderma palv-sol muturnius hêrezhel, treuzkaset er mod aotozomek trec'hok.


voie alterne ◇ **alternative pathway** ◇ **hent** g. **blivaat dazeilat** Hent blivaat ar glokaenn engwezhiat war-eeun en ezvezañ antikorfoù gant lies danvezenn enno luniadoù polisakarid (inulin, zimozan, bakteri). En kez hent ez eus proteinoù blivaat (C3, parenn B, parenn D, properdin) ha proteinoù reoliñ (β1H, C3b ezniñver) (sl. *complément* ha *facteur B, properdine*).

voie classique ◇ **classical pathway** ◇ **hent g. blivaat klasel** Hent blivaat ar glokaenn engwezhet gant an antikorfoù IgG pe IgM lenet war an antigen keñverek. An kez hent a c'hoarvez eus proteinoù blivaat C1q, C1r, C1s, C4, C2, C3, C5, C6, C7, C8, C9) ha proteinoù reoliñ (C1 ezniñver, C4BP, teskanv Sz. *C4b-binding protein*).

voies acoustiques ◇ **auditory tract** ◇ **forzhioù l. (b.) kleved** Hollad an elfennoù korfadurel loet etre ar milendall lienennek hag an droenn ividig uhelañ, o, c'hoarvezout eus an nervenn gempouez-kleved, ar rizennoù mel ar pevare kambr, al lietennoù gostezel hag ar c'horf glinek kreizel.

voies biliaries ◇ **hepatic ducts** ◇ **forzhioù l. (b.) bestl** Hollad ar c'hanolioù ma red ar vestl.

- **Pennforzh ar vestl** (Gl. *voie biliaire principale* Sz. *bile duct*) : lodenn eus ar forzh vestl ec'havuel etre kember an div san avu hag an daouzegenn, ouzh e ober enta : san voutin an avu betek difourk ar san gellenn, hag ar san vestl adalek an difourk.
- **Forzhioù bestl ec'havuel** (Gl. *voies biliaries extrahepatiques*) : lodenn eus ar forzhioù bestl en ardraoñ da borzh an avu, ouzh he ober : ar bennforzh vestl (san voutin an avu, san vestl) o vont eus an avu d'an daouzegenn, hag an adforzh vestl (kellenn vestl, san gellenn) skourret en andreug ouzh ar bennforzh.
- **Forzhioù bestl enavuel** (Gl. *voies biliaries intrahepatiques* Sz. *bile ductules*) : lodenn eus ar forzhioù bestl lec'hiet e diabarzh an avu, graet gant bleñchennadur ar c'hanolioù kevelat da varroù ar wazhienn borzh, o tisoc'h er c'hanolioù rannel, o unan o kemberañ d'ober sanioù kleiz ha dehou an avu.



voies lacrymales ◇ **lacrimal passages** ◇ **forzhioù l. (b.) daeraouiñ** Hollad al luniadoù korfadurel o kas an daeroù adalek sac'h an daeroù betek ode draoñ ar fri, anezhañ : poentoù an daeroù, loet war ribl rez an div valvenn en o farzh diabarzh, hiraet gant kanoligoù an daeroù krec'h ha traoñ endalc'het e parzh diabarzh ar malvennoù, an div ganolig-se o kemberañ en ur genganol a zifourk e sac'h an daeroù. Hounnezh, lec'hiet e nant an daeroù, a gendalc'h dre san a-fri an daeroù, o tifourkañ he unan e kavennoù ar fri.

voies olfactives ◇ **olfactory tract** ◇ **forzhioù l. (b.) c'hwesda** Hollad an elfennoù korfadurel lec'hiet etre ar glaourgenn c'hwesda ha kreizennoù eilvedel ar c'hwesda, anezhañ : neuron trobarzhel, ognonenn ar c'hwesda (kelligoù mintrek), troenn ar senklenn hag ar wrimenn greizel, ar rizen a-zibenn, ar grommenn, ar pennmarc'hig, pempilh ar pennmarc'hig hag ar freilh araok.

voies optiques ◇ **visual tract** ; **optic tract** ◇ **forzhioù l. (b.) gweled** Luniadoù nerval treuzkas o ren an eraezadenn weledel eus al luc'hsae d'an dolbezenn gilpenn, anezho : kranennoù kelligoù kangrennel al luc'hsae (eil neuronenn) o vont da amparañ an nervenn weled, gweltre ar gweled, stirad ar gweled; ar gwiennoù-se a vo azhetet e par ar c'horf glinek kostezel, ma teraou an trede neuronenn, ar gwiennoù anezhi oc'h amparañ ar saezhennadur a-weled hag o tibenniñ war div vriell an nant kentrevnek. Imbourc'h ar forzhioù gweled a vez graet diwar-bouez disoc'h ar gwelvaez, ar barroù dianfraou gweledel hag ar c'hwilerluniñ.

Voillemier : fracture type ~ ◇ **Voillemier's fracture** ◇ **torr g. rizh Voillemier** Torr daouek diazerc'h gouriz an ezel traoñ : al linenn dorr araok a dremen dre gorf pe barroù an askorn kaezour hag al linenn adreñv e par toullou ar groazell.

voix ligueuse ◇ ◇ **mouezh b. c'hroilhet** Mouezh raouliet ar glañvourion tizhet gant kankr plegoù ar vouezh.

volémie ◇ **blood volume** ◇ **ec'honad g. hollel ar gwad, gwadec'honad hollel** Ec'honad hollel ar gwad (plasma hag elfennoù luniek), o c'hoarvezout eus hollad ar gwad amredat hag eus ar gwad diloc'h er c'hadaveroù. Ent reol e vez ar gwadec'honad hollel gant ar gourev, ent keitlat, par da 76 mL/kg ha 66 mL/kg gant ar venev. Ec'honad ar plasma, gant ar gourev, a vez 46 mL/kg ha, gant ar venev, 43 mL/kg. Evit ec'honad an hemati a sav, gant ar gourev, da 30 mL/kg ha da 23 mL/Kg gant ar venev.

volet costal ◇ **flail chest** ◇ **pann b. kostoù** Parzh eus speur ar brusk heloc'haet ent diac'hinek e dianlen lies torr kostoù daouek.

Volhard : épreuves de ~ ◇ **Volhard's test** ◇ **prouadoù l. (g.) Volhard** — 1° *Prouad an devec'hiañ* : prouad amkanet da andalañ devec'hiusted (galloud devec'hiañ) bloc'hel al lounezhi; imbourc'hiñ a ra arc'hwel ar pibelloù. Ar c'hlañvour, er paouez, zo diret d'un argrenn dour e-pad 24 eurvezh (un hanter litr dour). E-doug an amzer-se e vuzulier bep 3 eurvezh kementad ha douester an troazh. Er stad vonan, ar c'hementad ezvevennet e-kerz 24 eurvezh ne zle ket distremen 800 mL, an douester a zle bezañ da nebeutañ, en ur standilhon, uheloc'h eget 1 024 hag an osmolder tolzel uheloc'h eget 800 mOsm/kg. — 2° *prouad an*

tanaviñ : prouad o kevaraezañ studiañ hedrezded al lounezh evit an dour. Euvriñ a ra ar gouzrec'h, gweleat, 1 500 mL dour betek kreisteiz; bep hanter eur e vez dastumet an troazh ha muzuliañ a reer bewech ar c'hementad hag an douester anezhañ. Er stad vonan e ranker ezvevennañ eus 1 300 da 1 600 mL ha douester unan eus ar standilhonoù a rank bezañ izeloc'h eget 1 003 hag an osmolder tolzel dindan 80 mOsm/kg. — An kez prouad, dilezet bremañ, ledet gant Volhard a veze arveret abaoe pell e Frañs gant Castaigne ha Paillard.

volition ◇ **volition** ◇ **mennout, youliñ** Gwezhañ bredel da dalvez da zevredañ un dra bennak, desellet e-maez ar gwezhiad dewerc'het.

Volkman : **difformités** ou **déformations de** ~ ◇ **1 Volkman's deformity** **2 Volkman's subluxation** ◇ **1 disneuziad g. Volkman** **2 gouzisevellad g. Volkman** 1 Gwariadur an troad war ziaevaez en arbenn eus arsav diorreadur eskern ar c'har, ar spilhenn pergen, o tevoudañ beskelled ar c'henvell fer-gar. 2 Disneuziadur ar glin e dianlen ur yoc'henn wenn ha fest dre dramaot. Naous eo dre un disvellad eus ar skin war ziadreñv, c'hweladur war ziaevaez ar c'har hag un argrommadur skin-morzhed argevek war raok.

Volkman : **maladie, syndrome, contracture** ou **rétraction musculaire ischémique de** ~ ◇ **Volkman's paralysis** ◇ **seizi g. Volkman, seizi heskwadel** Anaez arsellet e dianlen daraezioù an ilin, anezhañ ur varvenn heskwadel, heuliet gant skleroz ha berradur, o wazhañ un nebeut kigennoù eus an arvec'h, ent dibarek kigennoù pleger hir ar bizied. Devoudet e ve gant amwask ar gigenn gant ur gwatoñv don pe un anaf gwazhiedel. Ditouret ez eus bet degouezhioù a angrizadur heskwadel a 'r c'higennoù eus an ezel traoñ da heul un daraez pe amwask ur blastrenn re stardet. Gant furm gloc ar c'hleñved ez eus ur graban andreadus eus ar bizied (sl. *compartmental : syndrome* ~, *syndrome de compression des loges, syndrome de loge*).

Vollmer : **test de** ~ ◇ **tuberculin patch test, Vollmer's patch test** ◇ **prouad g. Vollmer** Argask un allergiezh tuberkulinel war-bouez arloñ e-pad 48 eurvezh, war ar c'hroc'hen dizruzet, ur garrezenn baper sil intret gant tuberkulin. Un ervezh foel a glot gant un disoc'h yaek.

volorécepteur ◇ **volume receptor** ◇ **buzer g. ec'honad gwad, ec'honvuzer** Buzer kizidik ouzh argemmoù ec'honad ar gwad amredat, loet ent dibarek er c'hentez dehou.

volt ◇ **volt** ◇ **volt g.** Unanenn ar gremmder tredanel hag ar c'hemm tredanvarr a 'r reizhiad etrevroadel SI, anezhi ar c'hemm barr etre daou boent un tredanreer, ma tremen ur red arstalek a 1 amper (1 A), ar c'halloudezh danzeet etre an daou boent-se o vezañ 1 watt (1 W). Skrivañ a reer : $U = P/I$, U o vezañ ar barr, P ar c'halloudezh hag I ar red.

voltaïque : **épreuve** ~ ◇ **voltaic test** ◇ **prouad g. voltaek pe prouad galvaniek** Embregad amkanet da imbour'hiñ ar milendall ha lodenn da rakkambur eus an eizhvet nervernn, anezhañ arloñ ur red tredan untu eus 2 da 7 mA diwar-bouez daou elektrod lec'hiet a bep tu d'ar penn, war ar rannbarzhioù rak-skouarn. Ent reol e vez arsellet, e-doug tremen ar red hepken, ur stouadur eus ar penn etrezek ar blein muiel hag un nistagmuz a-c'hwel durc'haet war-du ar blein leiel (sl. *vestibulaires : épreuves* ~ ha *vertige*).

volume courant ◇ **tidal volume** ◇ **ec'honad g. red** Ec'honad aer deloc'het da-geñver un analgor reol gant an oadour bonan er paouez, er gavael 400 – 600 mL.

volume de fermeture ◇ **closing volume** ◇ **ec'honad g. serriñ** Ec'honad skevent (peurliesañ dewerzhed diwar-bouez un dregantad eus ar barr bevadel pe eus ar barr skevent hollel) ma teraou serriñ an aerforzhioù trobarzhel (korrvronkez dibenn).

volume de réserve expiratoire ◇ **expiratory reserve volume** ◇ **ec'honad g. mir ec'hanelañ** Ec'honad aezhenn gavaelet etre dibenn an ec'hanelañ reol ha dibenn un ec'hanalad helc'het. Gant gerioù all, kementad aezhenn a c'haller c'hoazh kas er-maez dre un ec'hanalad helc'het goude un ec'hanalad reol.

volume de réserve inspiratoire ◇ **inspiratory reserve volume** ◇ **ec'honad g. mir enanalañ** Ec'honad aezhenn gavaelet etre dibenn un enanalad reol ha dibenn un enanalad helc'het. Gant gerioù all, kementad aezhenn a c'haller c'hoazh tennañ e-barzh ar skevent dre un enanalad helc'het goude un enanalad reol (korrvronkez dibenn).

volume expiratoire maximum seconde ◇ **timed vital capacity** ◇ **ec'honad g. (uc'hek) kentañ eilenn an ec'hanelañ helc'het** Ec'honad aezhenn distaolet e-doug eilenn gentañ un ec'hanalad helc'het goude un enanalad uc'hek. Ent reol ez eo par da 70 – 80 % eus ar barr bevadel (sl. *ventilation maxima*).

volume globulaire ◇ **total red cell volume** ◇ **ec'honad g. ruzkelligoù** Ec'honad hollel hemati ar bevedeg, e-tro 30, 5 mL/kg gant ar gourev, 23, 5 mL/kg gant ar venev.

volume globulaire moyen ◇ **mean corpuscular volume** ◇ **ec'honad g. keitat ar ruzkelligoù** Keñver etre an hematokrit ha niver ar c'helligoù ruz dre mm³, ent reol er gavael 85 – 95 µm³.

volume inspiratoire maximum seconde ◇ **forced inspiratory volume for the first second** ◇ **ec'honad g. (uc'hek) keitañ eilenn an enanalañ helc'het** Ec'honad aezhenn enanalec e-doug eilenn gentañ un enanalad helc'het goude un ec'hanalad uc'hek.

volume plasmatique total ◇ **plasma volume** ◇ **ec'honad g. plasma (hollel)** Ec'honad ar plasma bezant er bevedeg, e-tro 43, 5 mL/kg.

volume résiduel ◇ **residual volume** ◇ **ec'honad g. dilerc'h** Ec'honad an aezhenn andeloc'hadus o chom er skevent hag en aerforzhioù e dibenn un ec'hanalad helc'het.

volume systolique ◇ **systolic volume** ◇ **ec'honad g. sistolek** Ec'honad ar gwad diflistret gant pep kofig da bep sistolenn e-barzh an aortenn pe gef ar skevent.

volvulus ◇ **volvulus** ◇ **volvuluz g.** Gweadur un organ en dro d'e ahel, an troadig anezhañ da skouer, pe en dro d'e gandedenn evit ur c'hilbleg pervez, o tevoudañ arsav an oulennoù hag azoniad an antreizh pervez, pe c'hoazh gweadur ur c'hist eus ar vierez...

vomer ◇ **vomer** ◇ **soc'hég g.** Askorn eus an dremm, undañvat ha kreizer, oc'h amparañ parzh adreñv speur kavenn ar fri.

vomique ◇ **vomica** ◇ **poargarzañ, poargarzhad g.** Skrouediañ (skopad, paz) feuls o tarvezout e dianlen ur vezañs ezreol eus ul liñvenn e par ar skevent (pugnez skeventel), pe e par ar c'hrezoù (krezennfo da skouer) pe e par ar poullkreiz. An anvad *poargarzhad* a vez arveret evit an daspugnad bruskel liñvel (ar *poar* : levrzenn, lin, gwad) karzhet en doare-se.

vomissement ◇ **vomiting** ◇ **c'hweliñ, c'hwelad g., c'hweladur g.** Distaol trumm dre ar genoù an holl pe un darn eus endalc'had ar stomok, diwar un argrezad taer eus ar gandedenn hag ar c'higennoù kof. — **c'hwelad a-vomm** (Gl. *v. en fusée Sz. projectile vomiting*) : c'hweliñ trumm, hep striv ha hep heugenn diagent, arsellet dreist holl e degouezh pilhonfo pe uswask enkloppennel.

vomissements acétoniques, périodiques ou cycliques ◇ **cyclic vomiting** ◇ **c'hweladoù aketonek kelc'h troek pe arrea-dek** Azoniad, familhel a-wechoù, o teraouiñ trumm, arsellet gant ar vugale, o yec'hed o hañvalout bezañ mat, gant un derzhienn ha c'hweladoù. Bez' ez eus un angougemer klok ouzh al liñvennoù hag ar sonnennoù, a bad eus daou da eizh devezh. C'hwezhe treñk zo gant an anal, heñvel ouzh hini ar c'hloroform hag an aketon, uhel eo ar c'hetonwadvec'h ha korfoù ketonek zo en troazh. Gant ar c'hweladoù-se e vez alies kloppennadoù, kefroù hag ur mantr bras. An daolenn glinikel-se, heñvel ouzh hini ar pilhonfo, a baouez a-daol trumm ha pep tra a zistro en o reizh etre daou benn an deiz.

vomissements incoercibles ou graves de la grossesse ◇ **pernicious vomiting of pregnancy** ◇ **c'hweladoù diheud pe grevus ar vec'hiegi** Angougemer klok ouzh ar bouedoù sonnel pe liñvel gant ur peuranilboued o tevoudañ un disvezhur herrek, o tarvezout gant maouezed brazez 'zo e-doug an trimiziad kentañ, dindan delanvadoù diseurt.

vomito negro appendiculaire ◇ **gwadc'hweladoù du divilhennel** C'hweladoù gwad du puilh diwar greuzfo angreizhek gwadliñvus e dianlen an divilhennfo.

vomiturition ◇ **vomiturition** ◇ **amc'hweliñ** Dastreizhañ, c'hweliñ diglok, o karzhañ nebeud a zanvezioù.

Voorhoeve : maladie de ~ ◇ **Voorhoeve's disease** ◇ **kleñved g. Voorhoeve** Furm askornad ma 'z eo an tachadoù douesaet, e-lec'h bezañ poentek, gant rizennoù diazerc'h warno.

Voos : opération de ~ ◇ ◇ **oberatadenn b. Voos** Mod mezegañ al lezartroz, anezhañ skejañ surjanel kigennoù troarzel kenvell al lez, war-benn lemel ar gwask gweredet ganto war an talbennoù kenvellañ.

voussure ◇ **bulging** ◇ **gwadc'hweladoù du divilhennel** Bolzegezh neuziadurel, da skouer argeinegezh reñverek ar brusken en un tachad bevennek.

voûte archentérique ◇ **archenteric roof** ◇ **bolz b. an arc'hpervez** Speur a-gein an arc'hpervez, o kevelren plakenn an arc'hnerveg.

voûte dermique : technique de la ~ ◇ **dermal vault technique** ◇ **kalvezder g. ar volz derm** Kalvezder bronnatelviñ arveret da zereizhañ ar bronnusventoù hag ar bronnislinoù, o c'hoarvezout eus : 1° diepidermadur trorodenn; 2° dazbid kanteq reñver ar wagrenn e par talbenn don ar vronn; 3° spegañ ribl uhelañ ar rodenn, ha krouiñ ur volz o stabilaat ar vronn; 4° dastum dindan ar rodenn an ec'honenn o chom eus ar wagrenn. Gant seurt kalvezder e vez doujet da wazhiedadur beg ar vronn, pezh zo kevaraezus d'e stalañ en dibenn war run ar vronn.

voxel ◇ **voxel** ◇ **voksel g. -ioù** Gwreskanv diwar ar Sz. *volume cell element*, kevatal ar piksel en egor teirment, eleze ec'honenn elfennel, kevazas dreist holl evit derc'hennañ un ec'honenn gorfel amparet gant skeudennoù a-skej eus ur gouziviad. Setu perak e vez arveret er skeudennerezh mezegel teirment, gant un disoc'h herrek ha bastus.

voyage pathologique ◇ **pathological travel** ◇ **beaj b. kleñvedel** Dilec'hiadur graet dindan wered ur bredkleñved, en ur stad amheoliek pe trezerc'hadel, pe diwar ul lusked paranoiak.

voyeurisme ◇ **voyeurism** ◇ **gwelata** Troziadezh revel ma ne dizh ar gouzrec'h an oriadell nemet diwar-bouez sellout tredeourion oc'h emreiñ da oberiezhoù revel.

vulnérable du cœur : période ~ ◇ ◇ **prantad g. hec'hloazded ar galon** Lankad argrezañ ar galon ma emañ ur broudadur en arvar da zelankañ ur c'hrehad kofigel. Loet eo e dibenn sistol ar c'hofigoù hag ar prantad anvoudadus anezho; klotañ a ra gant gwagenn T ar c'halonvarrwezad.

vulnéraire ◇ **vulnerable** ◇ **dic'houlus aa.** A-zivout un danvezenn gleizennus, en araez da bareañ ar goulioù.

vulnérant ◇ **invasive** ◇ **trewan aa.** A-zivout ur gwezh mezegel oc'h enderc'hel treuziñ ar c'hroc'hen pe ur glaourgenn (sl. *effraktif, invasif, vulnérant*).

Vulpian : syndrome de ~ ◇ ◇ **azoniad g. Vulpian** Laurioù simpatek kevredet gant strafuilhoù gwazhiedloc'hadel ha gwrezel, arsellet a-wechoù da-geñver amwaskoù ar mel a-livenn er rannbarzh bruskel krenn.

Vulpian-Bernard : atrophie de ~ ◇ **vulpian's atrophy** ◇ **isteñv g. Vulpian-Bernard** Kaheisteñv argammedek livennel o teraouiñ gant ar skoaz.

Vulpian et Prévost : loi ou phénomène de ~ ◇ ◇ anadenn g. **Vulpian ha Prévost** Er c'homa al ledseizi, war-lerc'h ur resmiad orc'had, ar penn hag an daoulagad a vez troet e doare ma hañval ar c'hlañvour sellout ouzh e anaf, mar bez gwak al ledseizi hag a-eiltu mar bez kevredet al ledseizi gant dargrezadoù (sl. *déviation conjuguée des yeux* ha **Prévost** : *signe de* ~).

vultueux ◇ **bloated** ◇ **ruzevek** aa. A-zivout an dremm pa vez koeñvet ha ruspinn kenan, an divjod hag an divweuz koeñvennek, rubenn an nead, bourbellek an daoulagad, ar gwenn anezho o vezañ ruz pe rusoc'h.

vulve ◇ **vulva** ◇ **kourzh** g. Hollad organoù ganadel diavaez ar venev, anezho : ur gavenn greizer, rakkambr ar gouin, bevennet a bep tu gant ar muzelloù bras hag ar muzelloù bihan, ma tigor ar c'han troazh hag ar gouin. Ar muzelloù bras a echu a-ziaoaok war ur balir kreizer, menez ar c'haezour. Emañ an ellig e freilh uhelañ ar c'hourzh.

vulvectomy ◇ **vulvectomy** ◇ **kourzhezvenañ** Dazbidañ darnel pe hollet ar c'hourzh.

vulviforme ◇ ◇ **kourzhvanek** aa. Heñvel ouzh ur c'hourzh, da skouer a-zivout an *hipospadias* (sl. *hypospadias*).

vulvite ◇ **vulvitis** ◇ **kourzhfo** g. Tanijenn ar c'hourzh.

vulvo-vaginite ◇ **vulvovaginitis** ◇ **kourzhgouinfo** g. Tanijenn ar c'hourzh hag ar gouin, kevret alies gant kantroazhfo, oc'h erzerc'hañ dreist holl dre usvorc'h ar glaourgenn.

VVI ◇ **VVI** ◇ **VVI** Boneg etrevroadel un adalf unkavenn kofigel heudet gant ar wagenn R (sl. *stimulateurs cardiaques* : *code international des* ~).

VVI-R ◇ **VVI-R** ◇ **VVI-R** Boneg etrevroadel un adalf unkavenn kofigel heudet gant ar wagenn R, gant un talm yevet (sl. *stimulateurs cardiaques* : *code international des* ~).

VVO ◇ **VVO** ◇ **VVO** Boneg etrevroadel un adalf unkavenn kofigel angoubred (sl. *stimulateurs cardiaques* : *code international des* ~).

VVT ◇ **VVT** ◇ **VVT** Boneg etrevroadel un adalf unkavenn kofigel delanket gant ar wagenn T (sl. *stimulateurs cardiaques* : *code international des* ~).

W

W ◇ **W** ◇ **W** 1 Arouez *labour ar gwentañ* 2 Arouez ar *watt*, unanenn c'halloudezh 3 Arouez an *triptofan*.

Waalder-Rose : réaction de ou test d'hémo-agglutination de ~ ◇ **Waalder-Rose test** ◇ **prouad g. pe dazgwered g. Waalder-Rose** Dazgwered amkanet da zinoñ ar barenn rumatoidel. Ar gwadveiz, gant ar barenn ennañ, a zazglud an hemati dañvad kizidikaet a-gent e diraez ur gwadveiz kounikl antidañvad en ur bec'h uheloc'h eget an hini reol. An dazgludañ evit un dizolc'hiñ uheloc'h eget 1/32 zo hogos naouus d'al liesarzo rumatoidel; stadet e vez ivez e melennarzofoioù tromaotus 'zo, el lupuz eritematus lemm strewek hag en dermatomiozit (sl. *facteur rhumatoïde*).

Waardenburg : syndromes de ~ ◇ **Waardenburg's syndromes** ◇ **azoniadoù l. (g.) Waardenburg** — 1° Seurtad bizanskar-tourbennegezh nes d'an diskefalodaktiliezh, anezhañ un teskad kammneuziadoù hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, o kevrediñ un dourbennegezh gant un disneuziad tal-pod, un ished eus ar bizied kensoutet un disterañ, ul loakrezezh, ur fri hir ha moan hag a-wechoù kammneuziadoù kalon. — 2° azoniad o kevrediñ ezreolderioù ar malvennoù (dilec'hiadur war an diavaez eus ank diabarzh al lagad hag eus poentoù an daeroù), gwrizienn ar fri, ledanaet hag an divabrant o kejañ war al linenn greizer, ezreolderioù livegennel an envezioù, un albinegezh darnel, ur vouzarded pe ur bouzarmuderezh. A orin hilel eo an teskad kammneuziadoù-se, treuzkaset er mod aotozomek trec'hek.

Waardenburg-Jonkers : dystrophie cornéenne de ~ ◇ **Waardenburg-Jonkers disease** ◇ **mideñv g. Waardenburg-Jonkers** Ezreolder hêrezhel ar gornsaë treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, naouus dre zemerenoù e stumm malzennoù erc'h er gwiskadoù arak ha dre c'hougelled ar strafuilhoù arc'hwelel.

Wagner : maladie de ~ ◇ **Wagner's disease** ◇ **kleñved g. Wagner** Dic'henezhadur gwereg-luc'hsae hêrezhel, treuzkaset er mod aotozomek trec'hek. Al lienenn wrek adreñv a deva, ar gwereg a liñvela, lienenoù edañvennek a zinod, kevredet gant hogennadoù livegat al luc'hsae. Dedreñv a ra ar c'hleñved evel un isstiwel rouestlet gant skotom, gant ferennlug alies ha gant diflosk al luc'hsae.

WAGR : syndrome ~ ◇ **WAGR syndrome** ◇ **azoniad g. WAGR** Teskad kammneuziadoù o kevrediñ ur yoc'henn Wilms, un ankanevedenn, ezreolderioù troazhganadel hag un dilerc'h bred; ereet eo ouzh gouskoevadoù brec'h verr ar c'hromozom 11.

Wahl : signe de von ~ ◇ **Wahl's sign** ◇ **arouez b. von Wahl** Gloen gof lec'hiek oc'h erzerc'haat bezañ an antreizh pervez dre dagelladur.

Walbaum : syndrome de ~ ◇ **DOOR syndrome** ◇ **azoniad g. Walbaum** Teskad kammneuziadoù treuzkaset moarvat er mod aotozomek enkilek, o kevrediñ un dilerc'h bred, ur vouzarded, un iswe pe un ezvezañs eus oësoù pellek an daouarn hag an treid, gant trioefñs ar meud.

Waldeyer : anneau de ~ ◇ **Waldeyer's ring** ◇ **gwalenn b. Waldeyer** Hollad ar gwiad limfoidel en dro d'ar c'hargadenn, o c'hoarvezout eus huegoù ar c'hargadenn, ar stavn, ar gorzenn hag an teod.

Waldhausen : technique, opération ou aortoplastie de ~ ◇ **Waldhausen's operation** ◇ **oberatadenn b. Waldhausen** Gwezhiadenn amkanet da barraat ouzh isvoll ganedigel hir strizh an aortenn, gant un tachad isweek ledek. C'hoarvezout a ra a aberzhiñ an dalmerenn endan-drebez kleiz evit arverañ ar rann nezek anezhi dre he eilplegañ war strizh an aortenn war-benn dewerc'hañ un aortennatleviñ ledanaat hep amoug a zafar osodel.

Walker et Warburg : syndrome de ~ ◇ **Walker-Warburg : syndrome** ◇ **azoniad g. Walker ha Warburg** Empennaoued dibaot, marvus dindan un nebeut mizioù, o kevrediñ empennfoevñ hag ezreolderioù lagadel liesel, treuzkaset er mod aotozomek enkilek.

Wallenberg : syndrome de ~ ◇ **Wallenberg's syndrome** ◇ **azoniad g. Wallenberg** Azoniad nerval dastuat diwar un tizhad kostezel adreñv eus an hirvel. Erzerc'hañ a ra en deroù gant un trolern feuls kevredet, a-gendu gant an anaf, gant un nistagmuz, un azoniad ilpennel, un azoniad Claude Bernard-Horner, ur seizi eus ar gouel-stavn ha gant un tizhad eus an nervenn drigevell. A-eiltu e stader un tizhad livenn-derc'hvel a rizh aneraez gwrezel-laurel, oc'h erbediñ an dremm.

wallérienne : dégénérescence ~ ◇ **wallerian syndrome** ◇ **dic'henezhañ Waller, dic'henezhadur g. wallerek** Un nervwienn, pa vez troc'het pe flastret, ar parzh pellek e-keñver an anaf (eleze rann an akson dispartiet diouzh ar c'horf kellig oc'h enderc'hel ar graoñell) zo o vont da zic'henezhañ hervez un argerzh anvet *dic'henezhañ Waller* pe *dic'henezhadur wallerek*.

Traoliet e vez an aksonoù hag ar feurioù mielin anezho gant ar makrofag ha gant kelligoù Schwann, pezh a zevoud un isteñv eus kaherwiennoù buk an nervenn anafet. Neoazh, feurioù Schwann (an neurolemmoù) an nervwiennoù a zreistpad e rezh korzennoù goullonderet an endalc'had anezho. War-lerc'h 96 eurvezh e kas penn nezek an nervwienn broñsoù astiñvañ etrezek ar c'horzennoù-se, dedennet ma 'z int gant ar parennoù kreskiñ dedaollet er c'horzennoù gant ar c'helligoù Schwann, gant ma ne ve ket re vras ar pellerenn etrezo. E-se ez adkresk an nervwiennoù e korzennoù an nervennoù, betek tizhout ar givenn vuk ouzh he aznervaouiñ. E ken kaz ma ve re bell ar broñsoù astiñvañ diouzh korzennoù an nervennoù, emañ ur ratreañ surjaniel en ervez da wellaat ar chañsoù aznervaouiñ.

Walther : fracture de ~ ◇ **Walther fracture** ◇ **torr g. Walther** Seurtad nemedennek a dorr eus ar garvan, o kevredañ un torr daouek diazerc'h hag un torr diazremm.

Wangensteen : méthode de ~ ◇ **Wangensteen's method** ◇ **hentenn b. Wangensteen** Un hentenn arveret er bed a-bezh evit suc'hañ endalc'had ar stomok (sont stomok) gant ar c'houziviaded tizhet gant stoc'had treloc'hel ar pervez.

Wangensteen : opération de ~ ◇ **total fundusectomy** ◇ **oberatadenn b. Wangensteen** Deunezvenañ hollet (sl. *fundusectomie*).

Warburg : syndrome de ~ ◇ **Warburg's syndrome** ◇ **azoniad g. Warburg** Azoniad kammneuziadel marvuz treuzkaset er mod aotozomek enkilek, o kevredañ empennfoeñv ganedigel kenrat, annant (Gl. *agyrie*, ezreolder empenn ganedigel, naouus der ezvezañs a nantoù pluskenn, o reiñ d'an empenn un neuz levn, eleze an anvad heñvelster : *levnempennegezh* Gl. *lissencéphalie*) ha miwe al luc'hsae.

Warren : opération de ~ ◇ **Warren's shunt** ◇ **oberatadenn b. Warren** Dasforzhañ penn-ouzh-tu rann bellek gwazhienn ar felc'h, skejet, ouzh gwazhienn gleiz al lounezh. Kevredet eo gant argoulmañ funelladoù gwazhiedel talmerenn gleiz ar stomok, talmerenn stomok-danter dehou ha talmerenn dehou ar stomok. Gwezhiet e vez an oberatadenn-se evit hepkoriñ ar gwadliñvoù koazhadel adfeilhus dre uswask porzhel ar girrozeion; evit gwir e kevaraez diamwaskañ an teuc'helloù treizher a zo ar gwad anezho gwehennet war-du ar felc'h ha gwazhienn gleiz al lounezh, en ur virout ul lanvad porzhkandedennel rekis evit eroueriañ an avu.

Wartenberg : phénomène de ~ ◇ ◇ **anadenn b. Wartenberg** Serridigezh al lagad ha gwariadur ar c'haved a-eiltu pa vez touchet ar gornsaec, dre gedal arc'hwelel.

Wartenberg : signe de ~ ◇ **Wartenberg's sign** ◇ **arouez b. Wartenberg** Arouez seizi helmoel, ar biz bihan o vezañ war bellaat.

Warter et Métais : épreuve de ~ ◇ **Warter-Métais test** ◇ **prouad b. Warter ha Métais** Prouad da imbourc'hiñ sugerezh an druzennoù gant ar pervez. Lakaat a reer ar gouzrec'h da euvriñ ur c'hementad anavezet a eoul olivez ha barit. An dezventañ keveratael eus an euvradoù hag an diouladoù (daskavet bennozh d'ar barit) a gevaraez anavezout dregantad an eoul olivez suget, a vez nes da 90 % ent reol.

Wassermann : réaction de ~ ◇ **Wassermann's reaction** ◇ **dazgwered g. Wassermann** Dedalvezadur da zeznaou ar sifiliz eus dazgwered lenañ klokaenn Bordet ha Gengou. Yaek eo e gwadveiz ar glañvourion hag ivez e liñvenn benn-kein ar gouzrec'hiou tizhet gant sifiliz an nervahel. An antigen arveret da gentañ zo bet an avu nevez'haned tizhet gant sifiliz ganedigel, paot kenan an treponem ennañ. Goude eo bet dewerc'het ivez (Levaditi) an dazgwered-se gant douhennadoù organoù bonan, gant dileizhennoù taorokolat natriom hag ivez gant ur fosfolipid douhennet eus kalon pe kigennoù bioù, ar c'*hardiolipin*. Gwellaat eo bet dazgwered Wassermann — prouad Kahn, prouad Kolmer — ha ne vez ket mui arveret alies hiziv an deiz, amsavet ma 'z eo bet gant prouadoù all — prouad VDRL (Sz. *Veneral Disease Research Laboratory*), prouad RPR (Sz. *Rapid Plasma Reagin*) — , diazezet da gentañ war galvezderioù malzenniñ (Hinton) ha gant kalz nebeutoc'h a zisoc'hoù gaouyaek. Evit gwir, disoc'hoù gaouyaek bevedel ar prouadoù arvevez a erzerc'ha peurvuiñ un naoued grevus all, ur c'hleñved unanhangaeel alies.

Waterhouse-Friderichsen : syndrome de ~ ◇ **Waterhouse-Friderichsen syndrome** ◇ **azoniad g. Waterhouse-Friderichsen** hollek, o tinodiñ trumm, gant terzhienn, o tedreiñ etrezek ar c'homa hag ar marv dindan 12 da 24 eurvezh. Darvezout a ra ar peurliesañ gant bugale dindan 5 bloaz hag emañ e dalc'h un uslounezhennfo lemm gwadliñvus devoudet gant ar meningokok. Bez' ez eo ur purpura rurek.

Waterston : opération de ~ ◇ **Waterston's operation** ◇ **oberatadenn b. Waterston** Seurtad an oberadenn Potts ma vez dasforzhet tal adreñv an aortenn a-sevel ha tal araok barr dehou kef ar skevent.

Watkins ou **Watkins-Schauta-Wertheim** : opération de ~ ◇ **Watkins's operation, Schauta-Wertheim operation** ◇ **oberatadenn b. Watkins, oberatadenn Watkins-Schauta-Wertheim** Garbedennlita trec'hounel klokaet gant etrelakadur, etre ar gouin hag ar c'hwezhiell, eus ar grozh rake'hwelet, gwezhiadenn amkanet da barraat ouzh izad ar grozh, dreist oll pa vez kevredet gant drekc'hwelad ha c'hwezhiellogad.

Watson : syndrome de ~ ◇ **Watson's syndrome** ◇ **azoniad g. Watson** Teskad kammneuziadoù o kevredañ isvoll kef ar skevent, mireoù enkalonel, ur mineuz klopenn-dremm, ul labanded ha brizhennoù kroc'hen kafe dre laezh.

Watson-Jones : bandeage de ~ ◇ **Watson-Jones plaster** ◇ **anro g. Watson-Jones** Anro peg amkanet da vezegeañ an disvellad kernskoaz-trebez.

watt ◇ **watt** ◇ **watt g.** Unanenn c'halloudezh, par d'ur joul dre eilenn.

Weaver : syndrome de ~ ◇ **Weaver's syndrome** ◇ **azoniad g. Weaver** Teskad kammneuziadoù dibaot, anezhañ un enraog savder-pouez pergen da vare ar c'hanedigezh hag un enraog eus an oad eskern, ur mineuz dremmel gant skarlagadeg-

ezh, kammviziegezh hag un doniezh voud eus ar garm (sl. *Marshall : syndrome de ~* ha *Lawrence : syndrome de ~, diabète lipotrophique*).

weber ◇ **weber** ◇ **weber** g. Unanenn derenlanvad ar Reizhiad etrevroadel (SI), arouez : Wb.

Weber : compas de ~ ◇ ◇ **gaolrenn g. Weber** Gaolrenn arbennik o kevaraezañ muzuliañ ar pellder izek o tispartiñ daou boent, ar pikadur anezho o tec'han daou vroudadur diforc'h (sl. *esthésiomètre*).

Weber : épreuve de ~ ◇ ◇ **Weber's test for ear disease** ◇ **prouad g. Weber** Prouad o kevaraezañ resizañ orin un isklav dre geñveriañ ar stenren askornel adalek ur sonreizher festet war an tal pe war ar c'hernboent. Ar gleveraezadenn, dic'hallus da handuekaat gant ar gouzrec'h bonan, a vez handuekaet trema ar skouarn glañv e degouezh a anaf eus ar skouarn diavaz pe grenn, ha trema ar skouarn vonan e degouezh a anaf eus ar skouarn diabarzh.

Weber : réaction de ~ ◇ ◇ **Weber's test for blood** ◇ **dazgwered g. Weber** Dazgwered amkanet da zinoiñ ur c'hementad bihan a wad hag arveret evit arglask ar gwadliñvoù amguzh e-barzh diouladoù diseurt. An danvezenn da imbourc'hiñ, arwerc'het dre an drenkenn aketek hag an eter, a vez azdodet outi tentur gaiak hag ur banne dour oksigen; mar bez gwad enni ez eo an tentur gaiak oksidet gant an oksihemoglobin hag e teu ar meskad da vezañ glas.

Weber : syndrome de ~ ◇ ◇ **Weber's paralysis** ◇ **azoniad g. Weber** Azoniad anafel troad an empenn, naouus dre ul ledseizi dastuat hag ur seizi a-gendu eus nervenn loc'hañ al lagad.

Wechsler-Bellevue : test de ~ ◇ ◇ **Wechsler-Bellevue intelligence scale** ◇ **prouad g. Wechsler-Bellevue** Stroll prouadoù amkanet da zesavelañ, gant an oadour, ar rannad meiz.

Wegener : granulomatoze ou syndrome de ~ ◇ ◇ **Wegener's granuloma** ◇ **azoniad g. Wegener** pe **granulomatoz g. Wegener** Gwazhiedfo marvennus, deznaouet bennozha da vezañs er gwad eus unanantikorfou c-ANCA-PR3 (Sz. *Cytoplasmic ANtineutrophil Cytoplasmic Antibodies-(anti-)PRoteinase 3*, Gl. *auto-anticorps anti-neutrophiles cytoplasmiques-anti-protéinase 3*), dezhañ erzerc'hadoù skouarnfrigarloc'hennel (SFG) (kevfoioù, skouarnfoioù, frifoioù), skeventel (ozvennoù, gwadliñv enlogig) ha/pe lounezhel (blouieigfo). Unnervennaouedoù, purpuraoù, tanijennoù lagadel pe arzfoioù a vez a-wechoù. Naouus eo, ent wiadoniel, dre ur gwazhiedfo marvennus eus gwazhied bihan an amredoù bras ha bihan, dre c'hranulomoù ezwazhiedal ha dre varvennoù heskwadel. Gwellaet eo bet kalz an erdebad gant arver ar c'horkitoidoù hag ar c'hiklofosforamid (sl. *angéite allergique, vascularite allergique*, hag *glomérulonéphrite extracapillaire ou maligne ou aiguë anurique ou aiguë nécrasante ou à croissants*, hag ivez *granulome malin centro-facial*).

Weil-Félix : réaction de ~ ◇ ◇ **Weil-Félix reaction** ◇ **dazgwered g. Weil-Félix, prouad Weil-Félix** Dazgwered dazgludañ evit deznaou an tifuz eksantematek, diazezet war an devoud ez eus gant gwadveiz ar glañvourion un dazgludusted e-keñver skodoù 'zo a *Proteus* (Proteus OX 19).

Weill : signe de ~ ◇ ◇ **Weil's sign** ◇ **arouez b. Weill** Arouez kenrat skeventfo ar vabaned, anezhi ezvezañs an dec'honiñ analadel eus ar rannbarzh endan-drebez diouzh an tu tizhet.

Weill-Marchesani : syndrome de ~ ◇ ◇ **Weill-Marchesani's syndrome** ◇ **azoniad g. Weill-Marchesani** Heñvelster gant *azoniad Marchesani*, mideñv mezodermel ganediged, treuzkaset moarvat er mod enkilek, naouus dre ur gorrded, ur c'hlopennished, ur bizished, ur gorrferennegezh hag ur sferofakiezh, o tevoudañ alies ezlec'h ar ferenn hag, a-wechoù, ur glaokom. An disoc'h e ve, evel azoniad Marfan, eus un ezreolder a r'gwriad kenglenel.

Weinberg : réaction de ~ ◇ ◇ **Weinberg's test** ◇ **prouad g. Weinberg** Erwezh gwadveizel, anezhañ lenañ ar glokaenn evit deznaou an ekinokokoz, an antigen keñverek o vezañ bezant e liñvenn ar c'hist hidatek denel arveret.

Weinstein : syndrome de ~ ◇ ◇ **azoniad g. Weinstein** Teskad kammneuziadoù nes da azoniad Alström, diforc'h dioutañ avat dre ezvezañs an diabet ha dre vezañs ul lipidwadusvec'h.

Weiss : signe de ~ ◇ ◇ **Weiss's sign** ◇ **arouez b. Weiss** E degouezh a detaniezh, kiziata ank diavaez ar pod lagad a zevoud argezaed kigenn gelc'hennek al lagad.

Wellens : syndrome de ~ ◇ ◇ **Wellens's syndrome** ◇ **azoniad g. Wellens** Kevreted kevenkez ha strafuilhoù trebadek eus an advleinekaat er c'halonvarwezad (tuginadur don ar wagenn T en amdreugadoù argalonel V2 ha V3), en ezvezañs ar wagenn Q hag ezreolderioù merkerioù bevoniel angwazhiad ar c'halongaher. An kez azoniad a glot gant un isvoll start kenan eus talmerenn etre-kofigoù araok hag ur riskl uhel a angwazhiad raogtilhennel.

Wenckebach ou Luciani-Wenckebach : bloc, période ou phénomène de ~ ◇ ◇ **Wenckebach's block, Wenckebach's phenomenon** ◇ **tolc'had g. pe anadenn b. pe lankad g. Wenckebach** Furm a dolc'had kentez-kofig diglok ha direoliek, naouus dre un hiradur reoliek hag argammedek eus an entremez kentez-kofig (esaou PR) betek un argezaedenn gentezel digevret, heuliet gant ur paouez kofiged, an un kor oc'h adkregiñ goude. A-wechoù, war-lerc'h hiradur argammedek an esaou PR e tarvez, n'eo ket un, hogen div pe deir gwagenn gentezel tolc'het, hep ma ve dec'hanet un argezaedenn gofiged ganto (*lankad Wenckebach a 'n eil derez* : C Guérot, 1975).

Wenckebach : point de ~ ◇ ◇ **poent g. Wenckebach** Talm ar galon ma tarvez war e lerc'h un tolc'had kentez-kofig, e-doug ur prouad tredanfraouaat kentezel war-bouez ur sont enkavennel.

Werdnig-Hoffmann : amyotrophie, forme ou maladie de ~ ◇ ◇ **Werdnig-Hoffmann disease** ◇ **kleñved g. Werdnig-Hoffmann** Kahaeristeñv livennel ar vabaned dre zic'henezhadur ar motoneuron trobarzh, o tinodiñ kenrat e-doug mizvezhioù

kentañ an hoali hag o tedreñ ar peurliesañ etrezek ar marv dindan un nebeut bloavezhioù. Un naoued hêrezhel treuzkaset er mod enkilek eo, e dalc'h ur wariadenn er c'hromozom 5.

Werlhof : **maladie de** ~ ◇ **Werlhof disease** ◇ **kleñved g. Werlhof** Purpura olpladanel hennadek.

Werner : **syndrome de** ~ ◇ **Werner's syndrome** ◇ **azoniad g. Werner** Skleroderma isteñvek gant poikiloderma, yoc'hennoù kroc'hen, tizogvanegzh ha ferrenluc a-gaenn daoudu a rizh enborc'hadel ; un naoued hêrezhel treuzkaset er mod aotomezek enkilek eo, oc'h erzerc'hañ gant an oadour yaouank, kevredet a-wechoù gant osteoporoz, diabet hag ateroskleroz kenrat, o tisoc'hañ gant ur c'hoshaat rakkoulzat. Darvezout a ra ar marv war-dro pemont vloaz, a-wechoù dre berzh un anaez yud (sl. *Rothmund-Thomson* : *syndrome de* ~).

Werner : **test de** ~ ◇ **thyroid suppression test** ◇ **proud g. Werner** Proud amkanet da imboure'hiñ arc'hwel ar skoedenn, anezhañ desaveleñ krommenn delenañ an iod skinoberiek war-lerc'h diounezadur an triiodotironin, a astal ent reol gwered an tirotropin. E-kerz kleñved Basedow ne zigresk ket delenadur an iod skinoberiek.

Wernicke : **réaction hémipiquie de** ~ ◇ **Wernicke's sign** ◇ **erwez g. ledwelel Wernicke** Erwez arsellet e degouezhioù 'zo a ledangwel, naouus dre ezvezañs an damoug luc'hloc'hadel, pa angorz ar fraouaat luc'hel hanterenn al luc'hsae o klotañ gant an tu anafet.

Wertheim : **opération de** ~ ◇ **Wertheim's operation** ◇ **oberatadenn b. Wertheim** Kalvezder krozhezvenañ klok ledanaet evit kankr gouzoug ar grozh, anezhañ dilemel ar grozh hag an adkrozh, parzh uhelañ ar gouin ha gwiad kelligaoueg al lezkrozh.

Wesselsbron : **maladie de** ~ ◇ **Wesselsbron disease** ◇ **kleñved g. Wesselsbron** Víroz ar chatal diwar flaviruzoù, trezouget d'an den gant ar moustiked, deskrivet e Suafrika e Wesselbron; dedreñ a ra ar peurliesañ e rezh un anaf gripel.

Westergren : **méthode de** ~ ◇ **Westergren' method** ◇ **hentenn b. Westergren** Hentenn vuzuliañ tizh gouzediñ ar c'helligoù ruz.

Westermarck : **signe de** ~ ◇ **Westermarck's sign** ◇ **arouez b. Westermarck** Arouez skinlunadel enfroù skevent erzerc'haet gant un dreistsklaered eus ar rann heskwadet.

western blot ◇ **western blot** ◇ **western blot** Hentenn dinoñ ar protein dre hangaedreuzkas (sl. *immunotransfert*).

Westphal : **signe de** ~ ◇ **Westphal's test** ◇ **arouez b. Westermarck** Ezvezañs damoug ar padelleg, azon kenrat an tabez.

Westphal-Strümpell : **syndrome ou pseudo-sclérose de** ~ ◇ **Westphal-Strümpell pseudosclerosis** ◇ **azoniad g. pe gauskleroz g. Westphal-Strümpell** Anaez dibaot kaer, o tennañ d'ar skleroz strewek, anezhañ ur seurtad a zic'henezhadur auferregel. Naouus eo, *ent klinikel*, dre ur c'hren diarvennel, un deluzañ skoataet ha bezañ ur walenn staenek war wrimenn ar gornsae (trogornsaeenn Kayser-Fleischer); *ent neuziadurel* dre anafoù korrgreskerel eus pluskenn an ilpenn ha kangrennoù an diazpenn, o c'hoarvezout eus un danzeadur ezreol a neuroglia ha dre ur c'hirroze eus an avu, isteñvus ha nozelek, hep erzerc'hadou klinikel.

Wetherbee : **maladie de** ~ ◇ ◇ **kleñved g. Wetherbee** Louetvelfo arak henek dic'henezhadel, familhel an doare anezhañ, o teraouiñ en izili traoñ.

Weyers et Thier : **syndrome de** ~ ◇ **Weyers-Thier syndrome** ◇ **azoniad g. Weyers ha Thier** Seurtad azoniad ar c'hentañ gwareg vrenkel o c'hoarvezout eus : ezrederioù a 'r voull lagad (korrlagadegezh, unlagadegezh, kolobom), un angwe eus al leddremm ha kammneuziadoù mellennoù ar gouzoug hag ar brus (ledvellennoù, mellennoù gennheñvel pe anparek).

Wharton : **canal de** ~ ◇ **submaxillary duct** ◇ **san b. endan-c'haved** San degorzhañ ar wagrenn endan-c'haved o tigeriñ en nant logigoù-teod dre wash ar san endan-c'haved.

Wharton : **gelée de** ~ ◇ **Wharton's jelly** ◇ **gel g. Wharton** Gwiadoù kenglenel o c'hronnañ gwazhied ar funig vegel.

whartonite ◇ **whartonitis** ◇ **wartonfo g.** Tanijenn ar san endan-c'haved.

wheezing ◇ **wheezing** ◇ **analañ yudus** Sutad skiltr, analañ yudus lemm, o tarvezout ent dibarek gant an astmateion pe e degouezh a vronkezisvoll.

Whipple : **maladie de** ~ ◇ **Whipple's disease** ◇ **kleñved g. Whipple** Kleñved foel pervezel naouus *ent neuziadurel* dre goc'honiadoù behin ha trenkennoù druz er makrofag, oc'h ensilañ e gwiadoù limfel ar pervez hag ar gandedenn. Erzerc'hañ a ra dre un darc'hoal druzoulek gant treutadur muiek, en ervez da vezañ kevredet gant erzerc'hadou arzel ha c'hwarrennoù trobarzhel. Marvus e vez an dedro ent emdarzh, hogen parañ a ra dre vevastalgurañ, o vezañ ma 'z eo devoudet gant ur vakterienn nes d'an aktinomiket : *Tropheryma whipplei*.

Whipple : **méthode de** ~ ◇ ◇ **hentenn b. Whipple** Mezegadur istorel an amwadoù grevus ha yud zoken, dre euvriñ avu leue kriz pe nebeut poazh a gementadoù bras (eus 80 da 200 g dre zeiz) pe dre ziounit douhennadoù avu dre euvriñ pe dre ensinklañ.

Whipple : **triade de** ~ ◇ **Whipple's triad** ◇ **triad g. Whipple** Teskad teir elfenn naouus da zavodoù ar glukozwadisvec'h : delank gant ar yun, glukozwadvec'h izeloc'h eget 0, 50 g (2, 78 mmol/L), gwellaat dre euvriñ glukid.

Whitaker : **syndrome de** ~ ◇ **Whitaker's syndrome** ◇ **azoniad g. Whitaker** Anaez hêrezhel treuzkaset er mod aotomezek enkilek, o kevredañ arskoedisvorc'h ha kandidiaz kroc'hen. Unanhangael eo an kez anaez.

Whitaker : **test de** ~ ◇ **Whitaker's test** ◇ **proud g. Whitaker** Proud troazhloc'honiell, anezhañ ezwanañ lestr al lounezh ha gwezhañ ul lestrwaskventañ dindan ur c'has trefennañ arstalek. Ar bennaenn zo muzul tregemmel ar gwask etre ar c'hwezhiqell

ha lestr al louezh, trefennet gant ur c'has arstalek, war-benn dinoñ ur skoilh arc'hwelel bezus er san droazh, ar geforz lestr-sandroazh pe sandroazh-c'hwezhi-gell.

White-Bock : **indice de** ~ ◇ **White-Bock index** ◇ **ditourenn b. White-Bock** Ditourenn diazezet war studi ar gimplezh QRS en amdreugadoù trobarzhel. Eus sammad (e milimetr) ar gougammadoù muiel e D₁ ha leiel e D₃ e lamer sammad ar gougammadoù leiel e D₁ ha muiel e D₃. Studi an ditourenn a gevareez digemmañ gwariadurioù tredanahel ar galon diwar un usvent kofigel (ditourenn uheloc'h eget 17 mm) diouzh ar re devoudet gant un dehouc'hweladur eeun eus ar galon (ditourenn izeloc'h eget 17 mm).

Whitehead : **opération** ou **procédé de** ~ ◇ **Whitehead's operation** ◇ **oberatadenn b. Whitehead** Prederiadur surjaniel ar wazrudez dre zazbidañ andell ar wazrudez hag ar glaourgenn anvonan a zo warni.

Whitmore : **bacille de** ~ ◇ **Whitmore's bacillus** ◇ **bazhell b. Whitmore** *Pseudomonas pseudomallei*, gwezher spesadel ar melioidoz.

Whitmore : **classification de** ~ ◇ ◇ **rummadur g. Whitmore** Pazennoù kankr ar raksavenn. — A : enkelat korr-greskere. — B : ozvennoù enpourc'hadel heziraec dre an touch youlc'hel. — C : o tistremen ar pourc'had. — D₁ : dassezioù gwerblennel el lestr. — D₂ : dassezioù a-bell.

Wickham : **stries de** ~ ◇ **Wickham's striae** ◇ **rizennoù g. Wickham** Linnennoù arwenn moan kenan war c'horre krugennoù al liken plaen (sl. *lichen plan*).

Widal : **lois de** ~ ◇ **Widal's laws** ◇ **savelennoù l. (b.) Widal** Reolennoù istorel o savelañ erbedad tonkadel ul louezhfo henek a-geñver gant ar gwadvec'h urea o tigemman pevar live : 1° ur bec'h urea gavalet etre 8 ha 16 mmol/L a zle dedennañ an evezh ; 2° ur bec'h gavalet etre 16 ha 33 mmol/L a verk un tizhad dieiltro eus al louezhi o kas d'ar marv a-barzh daou vloaz ; 3° ur bec'h urea er gwad uheloc'h eget 33 mmol/L a laka erbedad ar marv war-lerc'h un nebeut mizvezhioù ha 4°, ur bec'h uheloc'h eget 50 mmol/L a vez diougan ur marv hogozek. Araokadennoù ar yac'haat, araezadoù an dializañ pergen, o deus digresket a-galz darganusted an kez "savelennoù".

Widal : **syndrome de** ~ ◇ **Widal's syndrome** ◇ **azoniad g. Widal** Barradoù astma delanket gant euvriñ aspirin, o tarvezout gant astmateion henek tizhet ivez gant polipoz ar fri. Ne hañval ket gwered argevezus an aspirin bezañ ur wikefre allergiek en degouezh-mañ.

Widal, Adami et Brulé : **ictère hémolytique, type** ~ ◇ ◇ **ikter g. gwadloezadel rizh Widal, Adami ha Brulé** Ikter gwadloezadel arzeuat (sl. *ictère hémolytique*).

Wide et Gemzell : **réaction** ou **test de** ~ ◇ ◇ **proud g. pe dazgwered g. Wide ha Gemzell** Dazgwered hangael o kevarezañ deznaou bevoniell kentrat ar vec'hiegi. Bezañs gonadotrofin korionel e troazh ar vaouez dougerez a vez dinoet dre un dazgwered heudañ an hematizazgludañ gouzañvat. Hemati, lenet warno an hormon-se, n'int ket mui evit bezañ dazgludet gant an hangaewadveiz keñverek, mard eo bet mesket hennezh a-rakwez gant un troazh ennañ an kez hormon.

Wiedeman et Beckwith : **syndrome de** ~ ◇ **Beckwith-Wiedeman syndrome, EMG syndrome** ◇ **azoniad g. Wiedeman ha Beckwith** Anaec ganedigel hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, o kevrediñ begelodad, teodusvent, ramzegezh, flugezusvent hag a-wechoù ur glukozwadisvec'h. Dinodiñ a ra ar ramzegezh er bugelvezh, gant dedro herrekaet an askornaat, tra ma argiz usvent an teod hag ar flugez ha ma anad ur stad rakdiabetek hag a-wechoù lipidwadusvec'hiek.

Wiedeman et Rautenstrauch : **syndrome de** ~ ◇ **Beckwith-Rautenstrauch syndrome** ◇ **azoniad g. Wiedeman ha Rautenstrauch** Azoniad kammneuziadel dibaot kaer treuzkaset er mod aotozomek enkilek, o kevrediñ ur gaouempennfoeñv hag un neuz progeriaek.

Wiggers : **unité** ~ ◇ **Wiggers unit** ◇ **unanenn b. Wiggers** Unanenn o talvezout da vuzuliañ an harzder gwazhiedel, kevatal da 1 dyn.s.cm⁻⁵.

Wilkins : **maladie de** ~ ◇ **Wilkins's disease** ◇ **kleñved g. Wilkins** Azoniad uslouezhuswe ganedigel oc'h erzerc'hañ dre arouezioù gaouerevegezh gant ar plac'h ha gant ur geurc'hanadkorfegezh kentrat gant ar paotr, diwar ur strafuilh ganedigel eus anaouez ar c'hortizol. Ar gortizolisvorc'hegezh a zelank un usvorc'h ACTH, an dianlenad o vezañ un uswe eus an uslouezhenn gant usvorc'h androgenoù. Bennozh d'ar mezegadur dre ar c'hortizon diounezet a-gentrat e teu ar pare.

Will-Ironside : **syndrome de** ~ ◇ **Will-Ironside syndrome** ◇ **azoniad g. Will-Ironside** Seurtad kleñved Creutzfeldt-Jakob arsellet e 1996 gant Saozon yaouank o doa bevezet kig bioù, gouziblet o unan dre euvradur bouedoù o tont eus deñved tizhet gant ar grenion.

Willebrand : **facteur de von** ~ (VWF) ◇ **Willebrand's factor** ◇ **parenn b. von Willebrand** Protein enaozet gant endotelienn ar gwazhied hag ar megakariokit, diziouerus da wered ar barenn VIII. Naouus eo an ezvezañs anezhi da gleñved von Willebrand.

Willebrand ou **von Willebrand-Jürgens** : **maladie de von** ~ ◇ **von Willebrand's disease** ◇ **kleñved g. von Willebrand** Naoued gwadliñvel hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek trec'hek deskrivet da gentañ en inizi Åland (Suomi). Paotañ strafuilh genezhel er gwadkaeañ (kentael) eo. O teraoiñ er vabaniezh, naouus eo *ent klinikel* dre wadliñvoù kroc'hen (bronduennoù), glaourgennoù (fronwadad, munsunwadañ, gwadliñvoù an huegoù, mizwadliñvoù) ha dre arzwadadoù ; a-wechoù *ent bevoniell* dre un hiraat muiet eus an amzer wadañ ha dre ezreolderioù plasmatek : divigad parenn VIII ha parenn Willebrand ; reol e vez pad ar c'haouediñ, hiraet an amzer kefallin blivaet ha reol an amzer Quick, reol e vez ar pladanoù evit a sell an niver hag ar

perzhioù anezho, lakaet er-maez ul leiadur eus o glenusted (sl. *Salzman : test de ~*) hag eus o dazgludañ gant ar ristoketin, diwar ezvezañs parenn Willebrand. *Dedro* ar c'hleñved, henek gant frapadoù, a ya trema un distav gorrek. Diouzh an dro e vez arveret an desmopresin ha devec'hiadoù parenn von Willebrand. — Tri rizh a vez deskrivet : 1 an hini paotañ ; 2 (ennañ ar strolloù daskenadoù A, B, M, N) ha 3, a-ziwarlerc'h ar gerent, dibaot ha grevus. — Ditouret ez eus bet degouezhioù dibaot kenan a *azoniad Willebrand arzeuat*, dre unanhangae moarvat, e-doug al lupuz eritematus lemm strewek, al leukemiezh limfoidel henek pe allergiezhoù liael (sl. *thromboplastinogène, thrombopathie pseudo-Willebrand IIb, desmopressine* ha *Willebrand : facteur de von ~*).

Williams-Campbell : syndrome de ~ ♦ **Williams-Campbell syndrome** ♦ **azoniad g. Williams-Campbell** Bronkezusvöll ganedigel dibaot diwar leiadur pe ezvezañs ar migom bronkezel.

Williams et Beuren : syndrome de ~ ♦ **Williams's syndrome, Beuren's syndrome** ♦ **azoniad g. Williams ha Beuren** Azoniad o c'hoarvezout a deir urzh kammneuziadoù : — 1° un isvöll aortek ustrapig sezet a-us da c'hod an aortenn, ambrouget a-wechoù gant ezreolderioù eus an aortenn a-sevel (iswe), eus barroù bras gwareg an aortenn, eus ar c'hurunerrennoù ha gant isvolloù eus barroù kef ar skevent. An kez ezreolderioù a c'hell bezañ displeget gant dargenadoù genenn an elastin ; — 2° un *enebrezh* naouus (enebrezh elf), gant un tal ledan, daoulagad skaret, ur fri gwinteiz, divweuz bras ezriblet, divvoc'h a-ispilh, elgezh puket ; — 3° un *dilerc'hegezh vred*. Heñvel eo an azoniad-se, gant e ezreolderioù neuziadurel, ouzh gwadusvec'h kalkiom hennadek ar vagadell. Devoudet eo gant ur c'horrzilead e 7q11.23.

Williamson : signe de ~ ♦ ♦ **arouez b. Williamson** Gouzizad tolbezenn gleiz an avu e-doug an amgalonennfo gant fennadur.

Willis : cercle ou hexagone de ~ ♦ **arterial circle of Willis** ♦ **kelc'h g. talmerennoù (an empenn)** Dasforzhad kelc'hiek e diaz an empenn amparet gant ar garotidenn diabarzh, talmerennoù arak hag adreñv an empenn hag an talmerennoù treuzkiz arak hag adreñv.

Wills : anémie de ~ ♦ **Wills's anaemia** ♦ **amwad g. Wills** Amwad mivezhurel deskrivet en India, arsellet e-doug an naonegezhioù hag ar brezelioù, diwar negezioù liesel (vitaminoù, proteinoù, houarn, h.a.). Un amwad ruzusventel ha megaloblastek eo, gant asikted, treutadur, gouliñvoù ha strafuilhoù koazhadel muiek.

Wilms : tumeur de ~ ♦ **Wilms's tumour** ♦ **yoc'henn b. Wilms** Adenosarkom al lounezh arsellet gant ar vugale yaouank hepken. Amparet eo gant kelligoù a rizh rizhellel : en ervez emañ da dizhout un ec'honad bras, an dedro anezhañ o kas buan d'ar marv.

Wilson : bloc de branche de type ~ ♦ **Wilson's bindle branch block** ♦ **tolc'had g. barr a rizh Wilson** Seurtad boas a dolc'had eus barr dehou an hordenn gentez-kofig (hordenn His), naouus, er 1^{añ} amdreugad, dre vezañs ur wagenn S ledan ha don o tont da heul ur wagenn R strizh hag, en 3° amdreugad, dre ur wagenn R ledanaet o tont da heul ur wagenn Q strizh.

Wilson et Mikity : maladie ou syndrome de ~ ♦ **Wilson-Mikity syndrome** ♦ **kleñved g. pe azoniad g. Wilson ha Mikity** Skorted analad argreskus gant elanal, entenn ha dulaz, o tinodiñ gant nevezc'hanidi rakkoulzek. Ar skinlunioù skevent a ziskouez skeudennoù nozelek kevredet gant un neuz rouedek, gant takadoù emfizem ha kistoù aezhel. An kez azoniad, dianav an orin anezhañ, a zisoc'h alies gant ar marv dindan an nebeut sizhunvezhioù. A-wechoù e vez paret diwar-bouez un oksigengurañ kendalc'het e-pad lies mizvezh.

Wilson ou Wilson-Brocq : maladie de ~ ♦ ♦ **kleñved g. Wilson-Brocq** Kroc'henfo dispelius hollek goulemm pe henek (sl. *érythrodermie*).

Wimberger : anneau ou signe de ~ ♦ ♦ **gwalenn b. pe arouez b. Wimberger** Azon skinlunadel skorbut ar vugale : kelc'h skindemer ent anreol en dro da vroñsoù talpennel an eskern hir.

Winchester : syndrome de ~ ♦ **Winchester's syndrome** ♦ **azoniad g. Winchester** Teskad kammneuziadoù o kevrediñ ezreolderioù kroc'hen, demerennoù ar gornsaes, hag ivez ur gorregezh gant akroosteoliz (askornloezañ an eizhaennoù) o teraoññ en arzorn hag er souk.

Wingate : test de ~ ♦ **Wingate's test** ♦ **prouad g. Wingate** Prouad strivañ anaerat ar sportour, anezhañ un embreg troadikellañ e-pad 30 eilenn gant un tizh uc'hek a-enep un harzder jedet a-gevreizh d'ar pouez korf (75 g/kg pouez korf). Muzuliañ a reer an uc'had tizh, ar c'hementad labour dedaolet e 30 eilenn hag izeladur ar c'halloudezh e-doug an embreg (ditourenn skuizhadusted).

Winslow : hiatus de ~ ♦ ♦ **toull g. an danter** Igorenn o kehentaat rakkambr yalc'h an danter ha kavenn vras an ampeleñ.

Winterbottom : signe de ~ ♦ **Winterbottom's sign** ♦ **arouez b. Winterbottom** Gwerblennusventoù gouzoug a-gein an tripanozomiaz afrikat (sl. *sommeil : maladie du ~*).

Wintrebert : méthode de ~ ♦ **Wintrebert's method** ♦ **hentenn b. Wintrebert** Kalvezder delaoskiñ oc'h arverañ fiñvoù gouzañvat pergen.

Wirsung : canal de ~ ♦ **pancreatic duct** ♦ **san b. an ilgreiz** San degorzhañ pennañ an ilgreiz o teheniñ a-hed ar wagrenn penn da benn a gleiz da zehou davit lodenn a-ziskenn an daouzegenn, o kejañ gant ar san vestl.

wirsungographie ♦ **wirsungography** ♦ **sanilgreizluniñ** Skinluniñ san an ilgreiz, leuniet a-gent gant ul liñvenn Xdemer (sl. *pancréatographie*).

wirsungo-jéjunostomie ♦ **wirsungojejunostomy** ♦ **sanilgreizadforzhañ er yunegenn** Dasforzhañ san an ilgreiz hag ur c'hilbleg pervez.

wirsungorragie ◇ **wirsungojejunostomy** ◇ **sanilgreizwadliñv** g. Gwadliñv dre san an ilgreiz a-dreuz d'ar gloestr avu-ilgreiz.

Wiskott-Aldrich : **syndrome de** ~ ◇ **Wiskott-Aldrich syndrome** ◇ **azoniad** g. **Wiskott-Aldrich** Azoniad hêrezhel treuzkaset er mod enkilek reveret, o tarvezout gant magadelled gourev. Adalek deizioù kentañ an hoali e tinod ur purpura hag alies ur melena ha goude, e-tro an trede miz, un ekzema. Marvus eo bepred an dedro diwar gwadliñvoù ha poreadoù (kroc'hene, skouarnfoel pe skeventel). Anv zo eus ur c'hleñved dre hangaezvig, un disgammaglobulinemiezh gant muiadur an immunoglobulinoù (Ig) A ha leiadur an IgM, strafuilh an dreistkizidigezh daleet hag olpladanoù (sl. *carence immunitaire, déficit immunitaire, immunodéficiance*).

Wissler-Fanconi : **syndrome de** ~ ◇ **Wissler-Fanconi syndrome** ◇ **azoniad** g. **Wissler-Fanconi** Azoniad mabanel naous dre eritemoù adfeilhus, ul liesc'hwarrenn, un derzhienn direolek, un avufelc'husvent, arzadoù leiek, o tedreñ etrezek ar pare dindan un nebeut mizvezhioù. Ned eo ket angemeret emrended an azoniad-se gant an holl aozerion.

Witebsky : **substance de** ~ ◇ **Witebsky's substance** ◇ **danvezenn** b. **Witebsky** Danvez spesadel a vez azdodet er gwad eus ar rizh O (hollroer) war-benn delenañ an aglutininoù antiA hag antiB a ve en ervez da zevoudañ darvoudoù da-geñver un erlec'hwata.

Witkop-von Sallmann : **maladie** ou **syndrome de** ~ ◇ **Witkop-von Sallmann disease** ◇ **kleñved** g. pe **azoniad** g. **Witkop-von Sallmann** Teskad kammneuziadoù treuzkaset er mod aotozomek trec'hek, o c'hoarvezout eus plakennoù arwenn war c'hlaourgenñ ar genoù hag ar gevresae.

Woakes : **ethmoïdite** ou **maladie de** ~ ◇ **Woakes's polyposis** ◇ **kleñved** g. **Woakes, polipoz** g. ar fri (sl. *polypose*).

Wodniansky : **syndrome de** ~ ◇ ◇ **azoniad** g. **Wodniansky** Poikiloderma o tinodiñ adalek ar c'hanedigezh, er c'hef hag en izili pergen, kevredet gant neridigezhioù papilhomatus eus ar glaourgennoù ha gant anafoù eskern.

Wolbachia ◇ **Wolbachia** ◇ **Wolbachia** Genad bakteri eus kerentiad an *Anaplasmataceae*, na boreont ket ar bronneged, o trigañ e kedvevadezh gant filar'zo, avat, a zo ar mezegadur gant an doksikiklin gweredus en o enep.

Wolcott et Rallison : **syndrome de** ~ ◇ **Wolcott-Rallison syndrome** ◇ **azoniad** g. **Wolcott ha Rallison** Aneaz familhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, o kevrediñ un diabet c'hwec nevezc'hanedel hag un talpennviwe liesel.

Wolff : **canal de** ~ ◇ **Wolff's duct** ◇ **san** b. ar **grennlounezh** San garzhañ ar grennlounezh (mezonefroz), oc'h emdreiñ d'ober an argell, ar san sper, ar c'hellennoù sper gant ar gourev hag o skoanañ gant ar venev.

Wolff : **éperon de** ~ ◇ **supraventricular crest** ◇ **kribenn** b. **us-kofig** Erien kaherek diadrez balirek er c'hofig dehou, o tispartiañ ar gambr degemer diouzh ar gambr diflistrañ.

wolffien ◇ **wolffian** ◇ **1 krennlounezhel** aa. **2 kribennel** aa. 1 A-zave d'ar grennlounezh (mezonefroz), eginenn lounezh gant ar rizhell, etre ar 4^e hag an 8^e sizhun, oc'h emdreiñ d'ober ar c'hanolioù ganadel gant ar gourev hag o lezel aspadennoù gant ar venev. 2 A-zave d'ar grienn us-kofig.

Wolff-Parkinson-White : **syndrome de** ~ (WPW) ◇ **Wolff-Parkinson-White syndrome** ◇ **azoniad** g. **Wolff-Parkinson-White** Azoniad kevredet gant bezañs ezreol un pe lies adreht (hordenn Kent) ouzhpenn hordenn His, o kehentaat ar c'hentezioù hag ar c'hofigoù, erzerc'het war ar c'halonvarwezad dre verradur an esaou PR (≤ 0,10 s) ha ledanadur ar gemplezh QRS, distummet dre un androad a un tu gant ar wagenn herrek, anvet gwagenn delta (sl. *préexcitation*).

Wölfler : **adénomes de** ~ ◇ ◇ **adenomou** l. (g.) **Wölfler** — 1^o **adenom krouell** : adenom kourzadek ar skoedenn, seurtad pennsac'h nozelek. — 2^o **adenom katok** : adenom hoginek pe c'hwezigennek ar skoedenn, seurtad pennsac'h nozelek.

Wolfram : **syndrome de** ~ ◇ **Wolfram's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Wolfram** Azoniad hêrezhel treuzkaset, moarvat, er mod aotozomek enkilek, o kevrediñ un diabet c'hwec olinsulinel, un diabet heuz, un isteñv gweledel daoudou, ur bouzarder dec'havael hag un antant eus ar c'hwezhigell. Emañ erdeb an azoniad e dalc'h azlamm an antant-se.

Wolman : **maladie de** ~ ◇ **Wolman's disease** ◇ **kleñved** g. **Wolman** Lipoidoz hêrezhel diwar divig dourannañ an triglikeroù, treuzkaset er mod aotozomek enkilek. Naous eo dre razekadurioù uslounezhel, un avufelc'husvent hag un dreistkarg kolesterol. Darvezout a ra ar marv e-tro pevare miz an hoali. Devoudet eo an azoniad gant un divigad lipaz trenkek lizozomel.

Wood : **lumière de** ~ ◇ **Wood's light** ◇ **gouloù** g. **Wood** Parzh a'r skalfad dreistmouk o tevoudañ kendrelec'h ar c'hroc'hen hag arveret evel araez deznaouiñ e kroc'henoù 'zo.

Wood : **unité de** ~ ◇ **Wood's unit** ◇ **unanenn** g. **Wood** An unanennoù evit dewerzhañ an harzder gwazhiedel zo : dyn.s.cm⁻⁵, Pa.s/m³, pe, evit ma ve aesoc'h da jediñ diwar ar gwask (muzuliet e mmHg) ha diwar kas ar galon (muzuliet e L/min) e teu e mmHg.min/L, unanenn Wood, anvet ivez *unanenn harzder kemmesk* (Sz. *hybrid resistance unit* (HRU)). Amañ dindan an amdreñ etre an unanennoù-se :

$$1 \frac{\text{mmHg} \cdot \text{min}}{\text{L}} (\text{HRU} = \text{unanenn Wood}) = 8 \frac{\text{Mpa} \cdot \text{s}}{\text{m}^3} = 80 \frac{\text{dyn} \cdot \text{s}}{\text{cm}^5}$$

Woods : **phénomène de** ~ ◇ **Woods's phenomenon** ◇ **anadenn** b. **Woods** Gourzhalerezh an drenkenn paraaminoben-zoek ouzh gwered bakteriherz ar sulfamidoù war hadennoù 'zo. Kendaolet he deus an arselladenn-se da zizoleiñ, gant Woods,

gwikefre werediñ ar sulfamidoù, o vonediñ evel gourzhkennevidadoù, dre skoilhañ arver an drenkenn paraaminobenzoek gant bakteri 'zo, diziouerus d'o c'hennevid ha d'o neridigezh.

Woringer : syndrome de ~ ◇ **Woringer's syndrome** ◇ **azoniad g. Woringer** Kevreted strafuilhoù arsellet gant ar bugel arzodet d'ur miarc'hwel eus an avu e dianlen un ennevid siek eus al lipidoù, anezho, dreist holl, gwentl, laurioù en avu, anilboued, anhun; an kez azonoù a steuz gant un hanren paot ar glukid ha dibaot al lipid ennañ.

Woringer-Kolopp : maladie de ~ ◇ **Woringer-Kolopp disease** ◇ **kleñved g. Woringer-Kolopp** Azoniad nes pe seurtad klinikel ar mikoziiz fongoidel hag azoniad Sézary, a zo an anafoù kroc'hen eritemgourc'hennus ha lieskelc'h troek anezho lec'hiek ha dedroat gorrek.

Worms : tétanos bulbo-paralytique de ~ ◇ ◇ **tetanz g. hirvelel-seiziel Worms** Furm detanz dibaot ha marvus bepred da heul ur gouli en tachad en dro d'al lagad; naouus eo dre un dargrezad eus kigennoù ar rannbarzh gouzoug-dremm, kevreted gant ur seizi eus nervenn loc'hañ al lagad hag a-wechoù eus an nervenn bellaat a-gendu gant ar gouli.

Worth : test de ~ ◇ **four dot test** ◇ **prouad g. Worth** Studiañ ar gweled daoulagadel diwar-bouez un ardivink oc'h arverañ pikoù luc'h livek, arsellet a-dreuz da werennoù arneet.

Wunderly : réaction de ~ ◇ **Wunderly's reaction** ◇ **dazgwered g. Wunderly** Malzenniñ gwadveizoù kleñvedel 'zo (stadoù foel : liesarzfô rumatoidel, sifiliz, poreoù, kleñvedoù ar gwad, h.a.), dre azdodiñ sulfat kadmium. A-zalc'h gant bec'h ar γ -globulinoù hag an α -globulinoù gwadveiz, ez eo aet dispredet hiviziken.

Wyburn-Mason : syndrome de ~ ◇ **Wyburn-Mason's syndrome** ◇ **azoniad g. Wyburn-Mason** — 1° (1948) nervennaoued lezhanweel a rizh liesgwrienniñ e-doug dedroadur ur c'hankr eus ar bronkez. — 2° (1943) kevreted darvolloù talm-erenn-gwazhienn ar grennempenn hag al luc'hsae gant nevuzioù kroc'hen; azoniad nes da hini Bonnet, Dechaume ha Blanc.


X

X : syndrome ~ ◇ **X syndrome** ◇ **azoniad g. X** Termen arveret gant aozerion 'zo evit deanviñ naouedoù diaes o displegadur pe diresis o despizadur. — 1° (kalonouriezh) (Kemp H. G., 1967-73) seurtad dibaot a skorted kurunerel, gant barradoù kevenkez kevret gant daskemmoù kalonvarrezadel dibad, gant prouad strivañ yaek, prouad metergin nac'hek ha kurunerlunad reol. 2° (Reaven G., 1988) (sl. *CHAOS : syndrome* ~).

xanthélasma ◇ **xanthelasma** ◇ **ksantelasma g.** Ksantom plaen ar malvennoù oc'h anadiñ e rezh takadoù vigelc'hiek bihan melen o livrezh, amparet gant koc'hionad kolesterol.

xanthémolyse ◇ ◇ **ksanthemoliz g.** Gwadloez lec'hiek ar c'helligoù ruz ec'hwazhiet kevret, dre zaskemmadur an hemoglobin, gant furmadur lec'hiek bestl, o livañ e melen al liñvenn a zo an hemati displeberet enni.

xanthine ◇ **xanthine** ◇ **ksantin g.** Bazenn burek (2-6 dioksupurin) diwar oksidatur an hipoksantin. Oksidet e vez o tisoc'h gant an drenkenn burek (sl. *bases xanthiques*).



xanthinurie ◇ **xanthinuria** ◇ **troazhksantinegezh b.** Bezañs ksantin en troazh. Ur c'hleñved kennevidel eo, treuzkaset er mod aotozomek enkilek, diwar un divigad ksantin oksidaz, gant furmadur grouan troazhel ksantek.

xanthochromie ◇ **xanthochromia** ◇ **1 pennkeinvelenegezh b. 2 melenlivegad g., melenlivegadezh b.** 1 Livrezh melen al liñvenn benn-kein diwar un treuzfurmadur eus an hemoglobin e livegennoù gwadien e-doug ur gwadliñvañ pilhon. 2 Livrezh melen ar c'hroc'hen (sl. *carotindermie* ha *xanthodermie*).

xanthodermie ◇ **xanthoderma** ◇ **ksantoderma g.** Heñvelster gant *melenlivegad, melenlivegadezh*.

xantho-erythroderma perstans ◇ **xantho-erythroderma perstans** ◇ **xantho-erythroderma perstans** Seurtad parapso-riaziz plakennaouek.

xanthofibrome ◇ **xanthofibroma** ◇ **ksantofibrom g.** Ksantom ennañ elfennoù stirek.

xanthogranulome ◇ **xanthogranuloma** ◇ **ksantogranulom g.** Ervezh foel henek ar gwiad behinel, naouus dre vezañs granulomoù ha makrofag bec'hiet a lipid.

xanthogranulome rétropéritonéal ◇ ◇ **ksantogranulom drek-ampelenn** Yoc'henn drek-ampelenn a zedro yud.

xanthomateuse : maladie ~ ou **xanthomateuse** ◇ **xanthomatosis** ◇ **ksantomatoz g.** Anvad rumm evit kleñvedoù kennevid al lipidoù, naouus dre amparadur koc'honiadoù kolesterol e poentoù diseurt eus ar bevedeg. E par ar c'hroc'hen e tisoc'h seurt argerzh kleñvedel gant furmadur ozvennoù pe plakennoù melen lec'hiet e-barzh ec'honenn an derm.

xanthomateuse cérébro-tendineuse ◇ **cerebrotendinous xanthomatosis** ◇ **ksantomatoz empenn-stirenn** Seurtad lipidoz navel familhel dibaot, naouus *ent neuziadurel* dre vezañs ksantomoù paot ar c'holesterol enno e-barzh steuñvenn wenn an empenn, ar stirenoù, ar c'hroc'hen hag a-wechoù ar skevent; *ent klinikel* dre un dilerc'h diorren bredel, un ankedre, gouseizioù gant kahegridoù hag ur ferennlug daoudu. Dedreñ a ra etrezek ur gouseizi gweuz-teod-garloc'henn hag ar marv dre seizi hirvelel.

xanthomatose cutané-muqueuse avec diabète insipide ◇ **Montgomery's syndrome** ◇ **ksantomatoz kroc'hen-glaourgenn gant diabet heuz** Anaez arsellet gant ar vugale hag ar grennarded, naouus dre gevreted ksantomoù kroc'hen ha glaourgennel, hag un diabet heuz, ha, dibaotoc'h, ur skorted rakgougorfennel. Argizus gorrek e vez an dedro.

xanthomatose hypercholestérolémique familiale ◇ **idiopathic hypercholesterolemic xanthomatosis** ◇ **ksantomatoz kolesterolwadusvec'hel familhel** Anaez hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek, naouus *ent klinikel* dre vezañs ksantomoù (ksantomoù kroc'hen e rezh yoc'hennoù, ksantomoù stirennel), ksantelasma, trogornsaenn hag aterom kenrat en talmerennoù, sourus en erbedad (kevenkez, talmerennfo empenn); *ent bevoniel*, dre ul lipidwadusvec'h, oc'h angorzhañ dreist holl ar c'holesterol (ar bec'h anezhañ, alies uheloc'h eget 5 g/L, a dizh pe a zistremen an dederenn eus hini al lipid hollel) hag ar β-lipoproteinoù; evit an triglikéridoù zo a-vec'h uhelaet ent keñverel. Ar *gwadusvec'h kolesterol hennadek pe familhel* zo ur furm grai a ksantomatoz kolesterolwadusvec'hel familhel, ma n'eus nemet an arozezioù dourennel. — An kez seurtad a *lipidwadusvec'h* gant gwadveiz boull, a glot gant rizh II Frederickson, a vez nebeut kizidik ouzh an hanren islipidek (sl. *hypercholestérolémie*).

xanthome ◇ **xanthoma** ◇ **ksantom** g. Koc'hionad kolesterol e-barzh ar c'hroc'hen, ar stirennoù, an eskern, e rezh brizhennoù pe nozelennoù melen enno kelligoù histiokitel o flasma spoumek, arsellet peurvuañ gant ar gouzrec'hioù lipidwadusvec'hiek tizhet pe arvaret gant un aterom en talmerennoù.

xanthomes cutanés ◇ ◇ **ksantomoù kroc'hen**

— **Ksantomoù strewek** (Gl. *xanthomes disséminés* Sz. *xanthoma multiplex*) : doare ksantomoù gant elfennoù bihan, a-vec'h balierek, melen ha goude azgell, dasparzhet war ar c'horf a-bezh, dreist holl war ar c'hrizadoù plegañ ha war dalioù kostezel ar gouzoug. Bec'h ar c'holesterol pe lipidoù all ar gwad ne sav ket a-ser ganto; disoc'h a reont diouzh un neridigezh retikulohistiokitel, digevret pe o vezañ unan eus elfennoù kleñved Schüller-Christian.

— **Ksantom dispuilhat** (Gl. *xanthome éruptif* Sz. *eruptive xanthoma*) : ksantom, a zo an elfennoù krugennek anezhañ, a vent gant penn ur spilhenn pe ur bizenn, melen sklaer, niverus kenan ha tolpet, o trediñ a-fragadoù (*ksantomatoz dispuilhat*) war dal astenn ar bleñchoù, ar feskennoù, an divweuz hag ar stavn askornek. A-wechoù e vezont kevredet gant un avufel'husvent hag un ilgreizfo; emaint e dalc'h un lipidwadusvec'h muiek ha padennek eus ar rizh I, 4 pe 5.

— **ksantom plaen** (Gl. *xanthome plan* Sz. *xanthoma planum*) : seurtad ksantom yoc'hennvanek amparet gant brizhennoù bihan pe nozelanoù melen. Hollek pe lec'hiek e c'hell bezañ, hag arsellet e vez war dalioù astenn an divvrec'h, war an daouilin hag an daouilin, war bleoù ar palv, ha dreist holl war ar malvennoù (ksantelasma). Ar peurliesañ emañ ar ksantom plaen kevret gant al lipidwadusvec'hioù aterombar (rizhoù 2 ha 4).

— **ksantom torosennek** (Gl. *xanthome tubéreux* Sz. *xanthoma tuberosum*) : seurtad ksantom yoc'hennvanek sezet war dalioù astenn an daouilin, an daoulin, war an divskoaz, amparet gant koefvennoù boullek pe gengronnet, al liv anezho o vont eus ar melen d'ar ruzvouk hag an ec'honad en ervez da dizhout hini ur vandarinenn. Ar peurliesañ e vezont kevredet gant lipidwadusvec'hioù kolesterolek (rizhoù 2 ha 3).

— **ksantom yoc'hennvanek** (Gl. *xanthome en tumeur*) : ksantom kevredet gant kolesterolwadusvec'h; kemm a lakaer etre ar ksantomoù plaen hag ar ksantomoù torosennek. En ervez emaint da vezañ azon kroc'henek ar ksantomatoz kolesterolwadusvec'hel familhel pe bezañ kevredet gant ar c'holesterolwadusvec'h pe kleñvedoù all (ikterioù padek, kirroz ksantomatus, skoedisvorc'h, h.a.). — Ar ksantomoù a c'hell dinodiñ gant gouzrec'hioù reol o gwadvec'h lipid, en anaezioù 'zo, da skouer : ar ksantogramulomatoz yaouerel, ar ksantomatoz kroc'hen-glaourgenn gant diabet heuz, an histiokitoz X, ar ksantoleukemiezhioù, disglobulinemiezhioù 'zo.

xanthomisation secondaire ◇ **secondary xanthomatous infiltration** ◇ **ksantomaat eilvedel** Ensiladur kolesterol en un anaez kroc'hen hanweel, dic'henezhadel pe poreel.

xanthopsie ◇ **xanthopsia** ◇ **melenarnewel** g. Strafuilh ar gweled, ma hañval an traoù bezañ livet e melen. Arsellet e vez a-wechoù en ikter hag er pistriadurioù gant ar santinin pe an drenkenn bikrek (sl. *chromatopsie*).

xanthoptysie ◇ ◇ **melenskopad** g., **melenskopañ** Skrouediañ danvezioù melen o tarvezout ent nemedennek e-doug siderosilikoz mengleuzerion an okr, da geñver boukadur tolzadoù yoc'hennek o skevent.

xénobiotique ◇ ◇ **ksenobiotek** aa., **ksenobioteg** g. -eier Aozad kimiek, tiadel pe c'hreantel, estren d'ar gimiezh vevedel, o werediñ evel ur bistrinni pe un allergen e-keñver ar bevedeg.

xénodiagnostique ◇ **xénodiagnosis** ◇ **alldeznaouiñ** Kalvezder imboure'hva, anezhañ lakaat ur gouzrec'h gousellet da vezañ tizhet gant ur c'hleñved arvevadell da vezañ flemmet gant un amprevan bonan eus ar spesad trezoug, ha goude arglask en kez amprevan bezañs an arvevad. An hentenn-se a vez enneget e deznaou kleñved Chagas (tripozomiaz amerikan).

xénoparasitisme ◇ **xenoparasitism** ◇ **anvevarvadezh** b. Erwezh leteñvel ouzh an hini dec'hanet gant un arvevad er bevedeg, o tarvezout pa vez entoet ur c'horf estren anvev. Kemm a lakaer etre : 1° *anvevarvadezh eeun*. Enkistañ a ra ar c'horf estren o tevoudañ un erwezh leiek pe vannel a-berzh ar bevedeg. : 2° *anvevarvadezh rouestladek*. Ar c'horf estren a zevoud pugnezoù pe vorferioù.

xénopathique : **pensée** ~ ◇ ◇ **dezevout amgenien** Anadenn vredel (dezevou, mouezhioù, trezerc'hioù) buhez gant ar gouziviad evel pa vije devoudet gant un oberiezh estren dezhañ, o tont eus an amgen, gourlakaet dezhañ (sl. *automatisme mental, syndrome de Clérambault*).

xénophonie ◇ **xenophonia** ◇ **estrenvouezh** g. Strafuilh ar mouezhparañ anezhañ reiñ d'ar gouzrec'h ur pouez-mouezh estren.

Xenopsylla ◇ *Xenopsylla* ◇ *Xenopsylla* Genad c'hwen, ar spesad bedvroat *Xenopsylla cheopis*, oc'h arvevañ ouzh lies krigner. Mirva pennañ bosenn an razh hag an den eo.



xérocyclose ◇ *xerocytosis* ◇ **kserokitoz** g. Dourisvec'h an hemati arsellet en amwadoù loezadel hêrezhel 'zo (sl. *stomatocytose*).

Xeroderma pigmentosum ◇ *Xeroderma pigmentosum* ◇ *Xeroderma pigmentosum* Mideñv kroc'hen hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, anaev dibaot ha grevus kenan diwar ur gizidigezh ezreol eus ar c'hroc'hen ouzh skinoù an heol (ar skinoù dreistmouk), o tinodiñ er mabanvezh. Naouus eo dre zinodadur plakennoù pe angreizhoù kroc'hen, gant korrwazhiedusvolloù, strafuilhoù teñvel ha livegennel ha dinodadur yoc'hennoù kroc'hen liesel ha yud. Dedreiñ a ra etrezek ar marv er vabaniezh pe er grennardiezh.

Un distabiled kromozomel a vez lakaet war wel *in vitro* gant ar gwezherioù dargeneiat (ar skinoù dreistmouk) : dec'han a reont daskemmoù e luniadur an DNA, anezho amparadur un ere kreñv nevez kenamsav etre div dimin diaheul loet war an un gwidenn DNA. An disoc'h zo furmadur ur c'horvell kikklobutan etre an div dimin. Ar c'horvellekaat-se a zistumm hag a reuta an DNA, o virout ouzh an DNA polimeraz a zewerc'hañ enaoz ar widenn glokaus ragenep da geñver dasparañ an DNA, pezh a skoilh emrannadur ar c'helligoù. Ar peurliesañ e vez an disoc'h marv ar c'helligoù pe ar c'hankr, pa na vez ket an anaf-se tratret gant enzimoù (sl. *instabilité chromosomique : syndromes d'~*).

NOTENN :

Amañ dindan ez erouezer ur geñveriadenn etre kelligoù — nepred lakaet en ardizh ar skinoù dreistmouk — erlamet diouzh ur gouzrec'h bonan ha kelligoù ur gouzrec'h tizhet gant *Xeroderma pigmentosum*. An daou seurt kelligoù a lakaer da diñvañ ha goude en o lakaer en ardizh ur skinad dreistmouk. War-lerc'h ar skinatadur e vuzulier en div diñvadenn dedroadur dregantad an dimeroù timin en DNA a-gevreizh d'an amzer :



xérodermie ◇ *xeroderma* ◇ **kseroderma** g. Seurtad iktioz gant ur c'hroc'hen sec'h hag ur gourc'hennadur hueek hepken.

xérophtalmie ou **xérome** ◇ *xerophthalmia* ◇ **kseroftalmiezh** b. Krinded gant isteñv kevresae boull al lagad, o vont arwenn hag o koll he sked. Devoudañ a ra demerded ar gornsae hag un dallder klok pe glokoc'h, o tisoc'h a-wechoù gant ar c'hornsae-vlodad. An arbenn a vez un tanijenn henek (trakom) pe un negez vitamin A (sl. *Gougerot-Houwer-Sjögren : syndrome de ~*).

xéroradiographie ◇ **xeroradiography** ◇ **kseroradiografiezh** b. Kalvezder skinkluniñ oc'h arverañ ar kserografñ, anezhañ un araezad haneilañ luc'hskeudennel o reiñ skeudenoù dargemmek kenan, soliet war berzh ar seleniom da zont da dredanreer. Arverañ a reer ar plakennoù kserografek da gaout skinklunioù hep an embregadennoù kimiek a zo gant ar skinklunadoù klasel, eleze "a-sec'h".

xérose ◇ **xerosis** ◇ **kseroz** g. Disec'hadur ar c'hroc'hen, diwar lies arbenn, evel anaezioù 'zo (*kroc'henfo atopek* anvet ivez *ekzema atopek*), negezioù (vitamin A pergen), pe barennoù diavaez, evel bezañ e diastok danvezennoù tanaillhus pe ar prederiadur gant liaoù 'zo. An henaded a vez tizhet aliesoc'h gant sec'hded o c'hroc'hen, naous dre ur struzhañ hollek ha reoliek eus ar gwiadoù kenglenel, e kemm diouzh ar skleroz a zo ur struzhañ lec'hiek ha direoliek e rezh enezigoù, ledadoù pe gourzadoù.

xérosis ◇ **xerosis** ◇ **kseroziz** g. Sec'hded ha keratinaat a-c'horre epitelienn kevresae al lagad, ha goude epitelienn ar gornsaec, o vezañ alies lankad kentañ ar kseroftalmiezh.

xérostomie ◇ **xerostomia** ◇ **sec'hgenoù** g. Sec'hded ar genoù diwar un isvorc'h pe anvorc'h ar gwagrennoù halviñ (sl. *aptyalisme* hag *hyposialie*).

xiphodyme ◇ **xiphodymus** ◇ **ksifodim** g. Euzheg daouat sisomian a zo kempet an daou gorf dre o rannbarzh izelañ betek diaz ar brusk, an div livenn gein o vezañ dispartiet hed-ha-hed hogos bepred.

xiphodynie ou **xiphoidalgie** ◇ **xiphodynia** ◇ **lechost** b. Laur e par al lech, diwar ur c'hamneuziad, un dараez, ar remm, ar goudonennfo, pe c'hoazh diwar ar saezhenniñ diouzh un organ kefin : kalon, stomok, livenn gein, kellen vestl, h.a.

xiphôide : **processus** ou **appendice** ~ ◇ **xiphoid process** ◇ **baleg** g. **al lech, lech** g. Parzh izelañ ar glerenn.

xiphopage ◇ **xiphopagus** ◇ **ksifopag** g. Euzheg daouat unvegell, a zo e zaou gorf unanet eus ar begel d'al lech, *breudeur siamat* da skouer.

XX : **syndrome des hommes** ~ ◇ **XX male** ◇ **azoniad** g. **ar c'houved XX** Anvet ivez *azoniad De la Chapelle* ez eo an azoniad un anaez a orin hilel na angorzh nemet ar baotred gant ur revezusted 1/20 000. Devoudet eo ar furm etrevegezh-se gant un treuzloañ eus ar c'henenn SRY (Sz. *Sex-determining region of Y chromosom*) adalek ar Y war-du an X (sl. an evezhiadenn amañ dindan). Naous eo dre gammneuziadoù an organoù genel, evel un hipospadias, un dilerc'h diorren eus ar c'hliedennoù, ur sperangellig hag ur venvronnegezh. Diazezet eo ar mezegadur war ziounit testosterone (hormongurañ).

Evezhiadenn :

Loet eo ar c'henenn SRY war ar c'hromozom Y, gourevel hepken (kromozomoù revel ar baotred zo XY ha XX evit ar merc'hed). Devoudus eo ar c'henenn SRY en diforc'hekadur revel gourev/benev, dre gevaraezañ danzeadur ar protein TDF (Sz. *Testis Determining Factor*). Enniñvañ a ra an TDF lies genenn o tec'han furmadur ar c'hliedennoù. Gant ar venev, ezvezañ ar c'henenn SRY a gas da furmadur ar vierezioù. E degouezh un dargenad hilel eus ar c'henenn SRY gant ar gourev e c'hell hennezh kaout organoù revel benevel. Bez' ez eus ivez degouezhioù dibaot a dreuzloadur, ma n'emañ ket ar c'henenn SRY war ar c'hromozom Y, met war ar c'hromozom X : ur venev a c'hell neuze kaout organoù revel gourevel.

XXXX : **syndrome** ~ ◇ **XXXX syndrome** ◇ **azoniad** g. **XXXX** Gonozomusriñv dibaot gant ar c'hariotip 48 XXXX. Gant ar beneved-se ez eus ur skarlagaedegzh, un epikantuz, ur rakwar, ul labanded anat hag ar peurliesañ ur mizanliñv (sl. *tétrasmie*).

XXXXX : **syndrome** ~ ◇ **XXXXX syndrome** ◇ **azoniad** g. **XXXXX** Kleñved diwar c'housokevad cromozomel dibaot kenañ, anezhañ ar c'hariotip 49 XXXXX. Gant ar beneved-se ez eus ul labanded don, un isganadegzh, ur vent vras ha lies kammneuziad, un skarlagaedegzh pergen, un ished gouzoug, ur rakwar, ur strizhded eus ar brusk, daoulin ezkromm, ur c'henaskornad gwerzhidilin hag ezreolderioù dentel.

XXXXY : **syndrome** ~ ◇ **XXXXY syndrome** ◇ **azoniad** g. **XXXXY** Seurtad dibaot kenan azoniad Klinefelter gant ar c'hariotip 48 XXXY ha diforc'h ent klinikel diouzh ar furm voas dre ur vent hag ul labanded vuiek hag ivez un neuz arbennik eus an enebrezh (sl. *tétrasmie* ha *Klinefelter* : *syndrome de* ~).

XXYY : **syndrome** ~ ◇ **XXYY syndrome** ◇ **azoniad** g. **XXYY** Seurtad dibaot kenan a azoniad Klinefelter gant ar c'hariotip 48 XXYY ha diforc'h ent klinikel diouzh ar furm voas dre ur vent hag ul labanded vrasoc'h, kevret gant un darwantusted vuiek.

D-xylose : **épreuve au** ~ ◇ **xylose test** ◇ **proud** g. **an D-ksiloz** Proud o kevarezañ studi sugañ pervezel ar glukidoù. Goude bezañ euvret 25 g D-ksiloz (sukrenn sugadus, ankennevidet er bevedeg hag ezvennet gant an troazh) e vez kavet ent reol etre 5 hag 8 g (etre 33 ha 53 mmol) en troazh borc'het e-doug ar 5 eurvezh da heul. Un ezvevennadur izeloc'h eget 3,5 g a erzerc'ha ur misug pervezel.

xylulose ◇ **xylulose** ◇ **ksiluloz** g. Ketopentoz diwar an drenkenn D-glukuronek hag ezvennet a gementadoù bras e-doug an droazhpentozegzh pe troazhksilozegzh.

Y

YAC ◇ **Yeast Artificial Chromosome** ◇ **YAC, kromozom g. kalvezadel ar goell** Seurtad trezouger amparet gant ur c'hromozom eus *Saccharomyces cerevisiae* ma 'z eo bet etoet an DNA a glasker kloniñ. Ar c'halvezder-se a gevaraez kloniñ tammadoù bras DNA.

Yacoub : opération de ~ ◇ **Yacoub's operation** ◇ **oberatadenn b. Yacoub** Gwezhiadenn surjaniel amkanet da barraat ouzh un darvill eus an aortenn a-sevel, outi un usvoll eus gwalenn sac'helloù an aortenn, en ur virout trapig naturel ar gouziviad. Azneuziet eo gwriazienn an aortenn diwar-benn un osod baotaouek.

Yergason : épreuve de ~ ◇ **Yergason's test** ◇ **prouad g. Yergason** Embreg amkanet da arwelaat distabilded stirenn ar gigenn daoubennek en nant etre-torzhelloù. An ilin o vezañ pleget da 90°, ar vrec'h diloc'hekaet ouzh ar brusk, ar palvsaviñ kontrollet a zevoud ul laur, ar stirenn o vont er-maez eus he nant.

Yersin : bacille de ~ ◇ **Yersinia pestis** ◇ **bazhell b. Yersin, Yersinia pestis** Bazhell verr kenan (kokobazhell) Gram — a gaver e-leizh e gwerbloù ar vosenn. Gwezher kleñvedus ar vosenn eo (sl. *peste*).

Yersinia ◇ **Yersinia** ◇ **Yersinia** Genad bakteri eus kerentiad an *Enterobacteriaceae*, gougevret outañ tri spesad kleñvedus : *Yersinia pseudotuberculosis*, *Yersinia pestis* ha *Yersinia enterocolitica*.

yersiniose ◇ **yersiniosis** ◇ **yersinioz g.** Amgant nozologek ma stroller ar c'hleñvedoù diwar hadennoù eus ar genad *Yersinia* : 1° Ar poreadoù diwar *Yersinia enterocolitica*, paot kenan er priadoù, en dour, er struzhennoù. Kalz dougerion a vez hep an disterañ azon erzerc'h. En ervez emañ da zevoudañ un hollbervezfo oc'h enstrewiñ goude ha kiriek e vez gwerblennoù tanijennek ar c'hof da laurioù. Alies e vez un eritem ozvennek, takadoù ruz ha laurus o valirañ war groc'hen an divesker, ul liesarzfo; 2° Ar poreadoù diwar *Yersinia pseudotuberculosis* pe *Yersinia malassezii* (a-gent bazhell Malassez ha Vignal), o tevoudañ poreadoù gwerblennel pe, strewekoc'h, gaouziivilhennfoioù; 3° Ar poreadoù diwar *Yersinia pestis*, eleze ar vosenn. Gweredus kenan e vez ar mezegadurioù dre ar bevastalerioù.

yeux de chat : syndrome des ~ ◇ **cat-eye syndrome** ◇ **azoniad g. an daoulagad kazh** Teskad dibaot kammneuziadoù o c'hoarvezout eus ur c'holobom a 'r ganevedenn, ur fic'h rak-skouarn, ezreolderioù ar benvegad troazhañ, un anvoll eus ar fraezh hag un empennaoued. Imbourc'h ar c'hariotip a erzerc'ha bezañs ur c'hromozom bihan dreistniver o tont eus ar c'hromozom 22.

yeux de poisson : maladie des ~ ◇ **fish eye disease** ◇ **kleñved g. an daoulagad pesk** Kleñved dibaot kaer o kevredañ demerennoù ar gomsae kentrat, ur feur triglikeridoù uhel hag ur feur kolesterol-HDL izel kenan.

Yocum : test de ~ ◇ **Yocum's test** ◇ **prouad g. Yocum** Embreg amkanet da lakaat war wel ur gouzañvder e-par stirenn ar gigenn is-sperenn. Gorreadur kontrollet ar vrec'h, an dorn lakaet war ar skoaz a-eiltu, a addec'han al laur emdarzh (sl. *périarthrite* ha *Neer : test de* ~).

yohimbine ◇ **yohimbine** ◇ **yohimbin g.** Alkaloid alfadolc'her ergemennet evel orgeteaid, douhennet eus rusk ur wezenn o kreskiñ e Kreizafrika, *Pausinystalia yohimba* (Rubiakeged) hag ivez eus ar *Rauwolfia serpentina* (Apokinakeged) (sl. *Rauwolfia*).

Young : signe de ~ ◇ ◇ **arouez b. Young** E kankr ar raksavenn, an touch youlc'hel a-ser gant kateteriñ ar c'han troazh diwar-bouez ur sont Béniqué, a gevaraez merzhout, etre ar biz hag ar benveg, un tevder bennak a wiad; gant ur gouzrec'h bonan pe en usvent ar raksavenn, er c'hontrol, e vez merzhet ar sont ouzh speur ar youlc'h.

Young : syndromes de ~ ◇ **Young's syndromes** ◇ **azoniadoù l. (g.) Young** — 1° Azoniad hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek o kevredañ ur sperankellig ha poreadoù analadel. — 2° Azoniad dibaot naouus dre zinodadur, gant ar venev, eus ur vorred o kreskiñ da-geñver pep brazezded, ha goude eus un diabet hag eus ar genel bugale varvc'honet pe re dev ha tizhet gant kalonusvent, ruzprañ avufelc'hel ha glukozwadisvec'h.

Youssef : syndrome de ~ ◇ **Youssef's syndrome** ◇ **azoniad g. Youssef** Troazhwadegezh miziaouel oc'h erzerc'haat ur fic'h krozh-c'hwezhiell uhel.

Yunis-Varon : syndrome de ~ ◇ **Yunis-Varon syndrome** ◇ **azoniad g. Yunis-Varon** Azoniad kammneuziadet dibaot kenan treuzkaset er mod aotozomek enkilek, marvus alies, o kevredañ ur goulerc'h korfadur, ezreolderioù niverus eus bizied an daouam hag an treid, un iswe eus an trebeziou, blev rouez hag ur gorravenegezh.

Z

zéisme ◇ **zeism** ◇ **maizegezh** b. Strafulhoù diwar euvriñ reñverek maiz. Gwechall e veze lakaet ar vaizegezh kiriek d'ar pellagr.

Zellweger : syndrome de ~ ◇ **Zellweger's syndrome** ◇ **azoniad g. Zellweger** Teskad kammneuziadoù dibaot kenan ha marvus buan, treuzkaset er mod aotozomek enkilek. Kevrediñ a ra dreist holl un isteñv gant kammneuziadoù klopendremmel (tourbennegezh), empennel ha kalonel, un dilerc'h bredloc'hadel, un istant kaherel muiek gant glizi, ur migornvideñv askorneiat, un avuusvent, lounezhi lieskistek hag un tezaorismoz houarnel. Ent bevoniel ez eo an avugelligoù anperoksizom.

Zenker : diverticule pharyngo-œsophagien de ~ ◇ **Zenker's diverticulum** ◇ **bogod g. Zenker** Ec'houinañ glaugenn an treizher o c'hoarvezout war speur adreñv ar c'hargadenn a-us d'ar gigenn lagadenn-gargadenn, diwar un digenurzh etre bount ar c'hargadenn ha laoskaat an treizher. Anv zo a *bogod diwar vount*.

zéziaement ◇ **lisping** ◇ **zeal** Kammzistagañ, anezhañ erlec'hiañ ar soniad [s] ouzh [ʃ] hag ar soniad [z] ouzh [ʒ].

Ziehen-Oppenheim : maladie de ~ ◇ **Ziehen-Oppenheim disease** ◇ **kleñved g. Ziehen-Oppenheim** Midant kaherel familhel disneuizus o tizhout ar Yuzevion rusian ha poloniat.

Ziehl-Neelsen : coloration de ~ ◇ **Ziehl-Neelsen stain** ◇ **livadur g. Ziehl-Neelsen** Hentenn arneañ arveret evit lakaat war wel bakteri alkooltrenkennharz (*Mycobacterium tuberculosis*, pergen) diwar-bouez livuzenn Ziehl.

Ziemssen : syndrome de ~ ◇ ◇ **azoniad g. Ziemssen** Seizi div nervenn gilreder ar c'harloc'henn. Difiñv eo an daou bleg mouezh en ul loadur arbellat, ar c'hlañvour a c'hell analañ, hogen n'emañ ket evit komz.

Zieve : syndrome de ~ ◇ **Zieve's syndrome** ◇ **azoniad g. Zieve** Kevreted un avuusvent, ur bestlanred, ul lipidwadusvec'h hag un amwad loezadel gant an alkooleion henek. Dedreiñ a ra etrezek ar pare dindan un nebeut sizhunvezhioù, gant ma ve astalet ar pistriadur.

ZIFT (transfert intrafallopian de zygote) ◇ **Zygote Intra Fallopian Transfer** ◇ **ZIFT, treuzplantañ ur vi frouezhiget en ur gorzenn a 'r grozh (TREVİK)** Seurtad engehentañ ameilet ent vezegel, anezhañ treuzplantañ ur vi frouezhiget en ur gorzenn eus ar grozh forzhkek ha bonan.

Zimmerlin : amyotrophie ou myopathie de type ~ ◇ **Zimmerlin's type of progressive muscular dystrophy** ◇ **kaheristeñv g. (rizh) Zimmerlin** Seurtad kahernaoued kentael argammedek o teraouiñ gant kigennoù hanterenn grec'h ar c'horf, ar c'higennoù ec'honek da gentañ.

Zimmerman : réaction de ~ ◇ **Zimmerman's reaction** ◇ **dazgwered g. Zimmerman** Dazgwered livventerezhel arveret evit dezventañ ar 17-ketokortikoid, mouk al livezh anezho en ur metoù alkaliek e diraez metadinitrobenzen.

zinc ◇ **zinc** ◇ **zink g.** Metal glas-gwenn e liv (arouez Zn), a niverenn atom 30, tolz mol atom 65,37. Arveret e vez halioù zink 'zo evit o ferzhioù krezus ha dilestus. Pistrisus eo halioù all : kloridenn, sulfat. Emañ ar zink o tasperzhiañ en amparidigezh un ugent bennak a enzimoù, da nebeutañ (anhidraz karbonek, fosfataz alkaliek, h.a.). Dasperzhiañ a ra ivez e kennevid kresk ar bevion. Uhel gant ar re yaouank ez a bec'h ar zink war vihanaat. Bezant eo dreist holl en avu, al lounezhi, ar c'higennoù, an ilgreiz hag ar raksavenn (sl. *Dalibour : eau de*, *fièvre des fondeurs*, *Pick : maladie de* ~ ha *doigt de zinc*).

zincose ◇ ◇ **zinkoz g.** Analeuflegezh devoudet gant dewentadur uloc'h zink.

Zinoniew : méthode de ~ ◇ **Zinoniew's method** ◇ **hentenn b. Zinoniew** Hentenn gaherekaat oc'h arverañ an treloc'h-yac'haat.

Zinsser-Engman-Cole : syndrome de ~ ◇ **Zinsser-Engman-Cole syndrome** ◇ **azoniad g. Zinsser-Engman-Cole** Anaez dibaot hêrezhel treuzkaset er mod aotozomek enkilek, moarvat, o souriñ gant ar c'houreved, oc'h erzerc'hañ war-dro an oad a 6 pe 7 vloaz. C'hoarvezout a ra eus : — 1° ul livegadur gell eus an ezkroc'hen gant korrvazhiedusvolloù war ar gouzoug ha gwrizioù an izili, hag alies isteñv ar c'hroc'hen hag ar glaugrennoù ; — 2° ul leukoplakiezh er genoù, an teod pergen ; — 3° ur mideñv eus an ivinoù. Ezreolderioù gwadel anarstal, goulerc'hat kenan alies, e dalc'h ur skorted askornvelel : peurolkelligoù pe amwad digevret, helivel ruzhe- pe ruzusventel ; nesaat a reont an azoniad *Z.-E.-C.* ouzh kleñved Franconi. Grevus eo an dedro. Darvezout a ra ar marv dre wadliñvoù, poreadoù pe zinodadur kankroù, liesel a-wechoù.

Zollinger et Ellison : syndrome de ~ ◇ **Zollinger-Elison : syndrome** ◇ **azoniad g. Zollinger hag Ellison** Borc'hidigezh a-fonn trenkenn glordrek gant ar stomok o tevoudañ angreizhoù kreuz-daouzegenn-yunegenn liesel hag adfeilhus, diwar ur yoc'henn en ilgreiz o tanzen ur c'hementad bras a c'hastrin. Tu zo da dostaat an *A.-Z.-E* ouzh adenomou enborc'hadel all : bez' e ve neuze un degouezh dibarek a adenomatoz liesenborc'hadel (sl. *Verner et Morrison : syndrome de ~, gastrinémie* ha *gastrinome*).


zona ◇ **zona, herpes zoster** ◇ **senkl g.** Kroc'henanaez lemm diwar ur viruz unrezh gant hini ar vrec'h nij, kerentiad an *Herpesviridae*, naouus dre un dispuilhad c'hwezigennoù, untu hogos atav, war ur goueled eritematus, stallet dre strollou war dreug un nervenn santout. Laurioù nervostel garv a vez a-raok an dispuilhad ouzh e amheuliañ hag o trebadout pell amzer goude ar pare. Evit ar sezioù paotañ e kaver : ar *senkl etre-kostoù*, ar *senkl lagadel*, ar *senkl empennel*. E-kichen ar senkl gwirion e ranker digemmañ an dispuilhadoù senklvanek a zo e dalc'h anafoù navel, kreizel pe drobarzhel ha dezho un dedro kevarall.

Zondek : méthode de ~ ◇ ◇ **hentenn b. Zondek** E mezegadur ar mizanliñvoù, arver follikulin ha lutein kemmesket hag ensinklet a-gevret.

Zondek et Aschheim : méthode de ~ ◇ **Zondek-Aschheim test** ◇ **prouad g. Zondek hag Aschheim** Deznaou bevoniell ar vec'hiegi diazezet war arglask an hormon korionel gonadotrofik e-barzh troazh pe gwad ar vaouez da imboure'hiñ. Dispredet eo an hentenn (sl. *grossesse : diagnostic biologique de la ~*).

zone ◇ **zone** ◇ **tachad g., takad g., parzh g., kelc'henn b., -va g., -van g.** Parzh, rannbarzh dezvonnet war ur c'horreenn, ur c'horf. — **tachad delankañ** (Gl. z. *déclenchement* Sz. *trigger zone*) : tachad usvroudadusted, ar fraouaat anezhañ o telankañ un erzerc'had grezvarrek (barrad droukfell, nervost). — **tachad erogen** (Gl. z. *érogène* Sz. *erotogenic zone*) : nep lec'hienn eus ar c'horf e tro da vezañ sez d'ur broud a rizh revel. — **ardreuzva** (Gl. z. *transitionnelle* Sz. *transition zone*) : parzh ardreuzadel, ma tremener eus ur metoù d'unan all. Er ferenn, da skouer, en ardreuzva ez emdreuzfurm ar c'helligoù epiteled tamm ha tamm e gwiennoù ar ferenn. — **kelc'henn drowanel** (Gl. z. *tropicale* Sz. *tropical zone*) : rannbarzh eus gorre an Douar etre Trovan ar C'hrank ha Trovan ar C'havr, naouus dre un hinad tomm. Un arbennigiezh eo ar *vezekniezh trovanel*.

zone : phénomène de ~ ◇ **zone phenomenon** ◇ **anadenn b. dachad** Ezvezañs a zagwared un antikorff spesadel gant e antigen keñverek e daou zegouezh : a) emañ feur an antikorfoù re uhel ha b) pe re izel. War grommemm derc'hennañ an dierc'hiñ pe an dazgludañ e lakaer war wel tri zachad, an hini kentañ anvet *raktachad*, an eil anvet *tachad kevatalded* hag an trede, an *diandachad*. A se e komzer a *anadenn ar raktachad* hag a *anadenn an diandachad* (sl. *prézone : phénomène de prézone* ou *phénomène de prozone*).



zonule de Zinn ◇ **zonule** ◇ **gourizig g. ar saeoù** Stagell amparet gant un teskad gwiennoù dastennek treuzwelus o terc'hel ar ferenn e-skourr war he gwrimenn penn da benn. Dre ar stennañ hag an distennañ devoudet gant kigenn ar saeoù e tec'han gwiennoù ar gourizig un daskemm eus krommder ar ferenn, kevaraezus da hestiañ al lagad : an argeidañ eo, ur seurt unanestiañ.

zonulolyse ◇ **zonulolysis** ◇ **gourizigloezañ, gourizigloez g.** Kalvezder o c'hoarvezout a ensinklañ el lagad un enzym — an *alfakimotripsin* —, en araez da loezañ gourizig ar saeoù, kevaraezus da ezvenadur ar ferenn e-doug oberatadenn ar ferennlug.

zonulotomie ◇ **zonulotomy** ◇ **gourizigenbenañ** Skejañ surjaniel gourizig ar saeoù, war-benn kevaraezañ ezvenadur ar ferenn.

zoomanie ◇ **zoomania** ◇ **milvar g.** Karantez kleñvedel evit al loened.

zoomylien ◇ **zoomylus** ◇ **zoomil** g. Euzheg unat dineuz en ervez da zinoññ gant al loened hag an den ivez e-doug ar vec'hiegi, anezhañ ur c'hemmesk tammoù eskern, blev, dent, h.a., en ul liñvenn levrus, an hollad o vezañ gronnet en ul lienenn dermoidel englenet war-eeun ouzh glaourgen ar grozh, ma emañ oc'h arvevañ.

zoonite ◇ **zoonitis** ◇ **zoonit** g. Pep hini eus hanrannoù eus ul loen kenvellek pe hanrannek, dreist holl un hanrann sellet evel ur bevedeg dioutañ e unan. Astennet d'ar mellkeineged ez eo eorizh elfennel ar furmoù loenel (sl. *métamérie*).

zoonose ◇ **zoonosis** ◇ **milanaez** g. Anaez o tizhout al loened, en ervez da vezañ treuzkaset d'an den.

zooparasite ◇ **zooparasite** ◇ **milarevad** g. Arvevad gougevret ouzh ar riezad loenel.

zoopathie ◇ **zooparasite** ◇ **milnaoued** g. Naoued o tizhout al loened.

zoophilie ◇ **zoophilia** ◇ **1 milgerc'hañ 2 milvreadezh** b. 1 Doug amprevaned 'zo d'envagañ diwar al loened doñv (konikled, moc'h, bualed) kentoc'h eget diwar an den. 2 Karantez evit al loened. A-wechoù ez a betek ar *vilvreadezh orgedel*, ar *viloriadezh* (sl. *bestialité, zoophilie érotique*).

zoophobie ◇ **zoophobia** ◇ **mlarur** g. Amgren kleñvedel rak loened 'zo.

zooprophylaxie ◇ **zooprophylaxis** ◇ **milzigswallañ** Disgwall, gwarez an den a-berzh loened a gav gwell an anofel envagañ diouto eget diouzh an den.

zoopsie ◇ **zoopsia** ◇ **milwel** g. Trezerc'h gweledele ma wel ar gouzrec'h loened, spouronus ar peurliesañ. Paot eo en alfo alkoolel lemm.

zoose ◇ **zoosis** ◇ **zooz** g. Kleñved arvevadel a orin loenel.

zoostérol ◇ **zoosterol** ◇ **zoosterol** g. Anvad genadel ar steroloù a orin loenel.

zostérien ◇ **zoster** ◇ **senklel** aa. A-zave d'ar senkl.

zostérimorf ◇ **zosteroid** ◇ **senklvanek** aa. Heñvel ouzh ar senkl.

Zuckermandl : **organe** ou **corps de** ~ ◇ **Zuckermandl's bodies** ◇ **korfoù** l.(g) **lez-aortenn** Bloue aortek lec'hiet e-kichen orin talmerenn izelañ ar gandedenn.

Zuelzer ou **Zuelzer-Apt** : **syndrome de** ~ ◇ **Zuelzer's syndrome** ◇ **azoniad** g. **Zuelzer** Azoniad deskrivet gant ar bugel, anezhañ un avuusvent, ensiladurioù skeventel, un astma, tizhadoù arzel, ul linadell ha glizi. Bez' ez eus un usniver leukokit er gwad gant ur gwadeleozinofil hag ur γ -globulinwadusvec'h. An kez azoniad a ve ur furn guñv a wazhiedfo granulomatus allergek hag e renkañ a reer e-touez kleñvedoù an hangaegemplezhioù.

Zuelzer-Kaplan : **syndrome de** ~ ◇ **Zuelzer-Kaplan syndrome** ◇ **azoniad** g. **Zuelzer-Kaplan** Kevreted ur moramwad hag un hemoglobinoz (sl. *thalassémie*).

Zweifel : **signe de** ~ ◇ **Zweifel's sign** ◇ **arouez** b. **Zweifel** Askennad kouc'hell ar gelc'hspurenn diouzh tu an anaf, arsellet a-wechoù er skinselliñ, e dianlen un enffroù skevent.


zygapophyse ◇ **zygapophysis** ◇ **baleg** g. **kenvellañ** Pep mellenn zo outi pevar baleg kenvellañ, daou uhelañ durc'haet etrezek ar vellenn a-us ha daou izelañ etrezek ar vellenn a-is. Emaint el lec'h ma kej troadigoù ha lavnennoù gwarez ar vellenn.

zygomatique ◇ **zygomatic** ◇ **a-voc'h** aa., ~ **ar voc'h** A-zave d'ar voc'h. — **kigenn a-voc'h bras ha kigenn a-voc'h bihan** (Gl. *muscle grand et petit z. Sz. zygomatic muscle greater, lesser*) : kigennoù uhelaer ar weuz krec'h o reiñ dremmvez ar c'hoarzh. — **askorn boc'h** (Gl. *os malaire, os zygomaticue*) : askorn daoudañvat an dremm o valirañ dindan ar voc'h, o stummañ korn ar voc'h.

zygote ◇ **zygote** ◇ **vi** g. (**speriet, frouezhiget**) Kellig goude uniañ an daou c'hamet gourev (spergellig) ha benev (vigellig).

zygotène ◇ **zygotene** ◇ **zigoten** aa. A-zave da drede pazenn kentañ profaz ar meioz pa vez ar c'hromozomoù kevelep kempeteg strizh.

zymase ◇ **zymase** ◇ **zimaz** g. Enzim borc'het gant ar goell o treluskañ treuzfurmadur ar glukoz e dioksidenn garbon hag alkool e-doug ar c'hoidigezh.



zymogène ◇ **zymogen** ◇ **zimogen** *g.* Danvezenn broteinek diaraoger anniñvek un enzym, evel da skouer : an *trypsinogen*, ar *c'himotrypsinogen*, ar *fibrinogen*, an *tromboplastinogen*, ar *proakelerin*, h.a. Teuzfurmadur ar zimogen en un enzym niñvek zo delanket dre wered ion H^+ ha dreist holl dre vezañs an enzym e unan, buanez an dazgwered o herrekaat gant araokaat an dazgwered (kordreluskañ). Bezañs er bevedeg eus enzimoù e stad diaraogeriou anniñvek a hepkor emgoazhañ ar gwiadoù, kaouledin ar gwad er gwazhied, h.a.

zymonématose ◇ **zymonematosi** ◇ **zimonematoz** *g.* Seurtad mikoz diwar *Zimonema*. An daou rizh paotañ zo kleñved Gilchrist ha hini Lutz-Splendore-Almeida (sl. *blastomycose*).

zymotique ◇ **zymotic** ◇ **goel** aa., **goidigezhel** aa. A-zave d'ar go, d'ar c'hoidigezh.

STAGADENN

Ar pevar domani eus ar beved

E 1859 e reveulzias arlakadenn Charles Darwin an doare o doa ar skiantourion da veizañ ar beved hag an hir a zedro anezhañ. E 1866 e kinnigas an naturour alaman Ernst Haeckel (diazegour an drevoniezh) e wezenn filogenetek, derc'hennadur gwezenn ar bevion gant e gef pennañ, oc'h arouezñ diagentiad boutin d'an holl vevion, hag ivez gant e varrou niverus fuilh, o klotañ ouzh al lies lizez o deus kaset d'ar bevedegoù a vremañ.

Ar wezenn unel-se, ergraf heverk evit ar mare, a venne dastum hollad ar bevion anavezet e teir riezad e-lec'h an div riezad savelet gant arlakadenn Linné : al loened, ar plant hag ar protisted, ar “barr” diwezhañ-mañ o c'hougevaniñ hollad ar bevedegoù unkellig, en o zouez an amoeb, ar spoue, an diatom hag ar bakteri. Neoazh e verzhaz Haeckel e save ur gudenn drezek gant ar bakteri, rak ne oa kraoñell ebet enno.

Skiant dibenn an 19^{vet} kantved n'he doa ket ar binvioù elfennañ galloudus rekis evit savelañ ur rummadur filogenetek, en araez d'ober meiz war an derezioù kerentiezh etre strolloù bras ar bevion. Brientekaet e voe gant ar gumuniezh skiantel ur rummadur arverek eus ar spesadoù, eleze diazezet war naousterioù neuziadurel (stummoù) ha kennevidel (arc'hwel bevgimiek).

60 vloaz 'zo ez embannas ar c'horrvevoniour gall André Lwoff ur pennad a zo chomet brudet, ma tifenne ar mennoz e oa d'ar viruzoù ur spesadelezh andreadus e gwezenn veur ar beved. Ar vevoniourion a zarbennas neuze ar c'hemm etre tri domani bras a 'r beved : an eukariot (bevedegoù unkellig pe lieskellig a zo ur graoñell en o c'helligoù), ar prokariot (bevedegoù a zo o c'helligoù hep kraoñell) hag ar viruzoù.

Hogen ar c'horrvevoniour amerikan Carl Woese (1928-2012) eo a zeuas a-benn, e-kerz ar bloavezhioù 60, da gemalañ lies RNA ribozomek eus bevedegoù diseurt ha da savelañ e 1977 ur wezenn filogenetek nevez eus ar bevion o rummata ar bevedegoù-se dre heñvederioù. En trevnadur nevez-se eus ar beved ne ampar ket mui ar prokariot ur stroll unel, hogen daou : an arkebakteri anvet bremañ *Archaea* hag ar *Bacteria*.

E teuas neuze ar mennoz e ranke bezañ ur wrizienn voutin d'ar wezenn-se eus ar bevion. An diagentiad boutin diwezhañ-se a voe graet LUCA anezhañ (*Last Universal Common Ancestor*) gant ar vevionourion c'hresian Christos Ouzounis ha Nikos Kyrpides e 1994. Er bloavezhioù 90 e tiorreas Carl Woese e ergraf a *progenot* hag a ginnigas e arlakadenn ne glote ket an tri domani a 'r beved — *Archaea*, *Bacteria* hag *Eukaria* — ouzh ur bevedeg resis, met ouzh un emdroadur a-strew hag a-rouedad eus ar beved.

Dre labourat war RNA ribozomek maiz o tont eus mitokondri ha kitoplasm ar c'helligoù e tiskouezas Carl Woese en un doare rik e oa eus ar mitokondri hag ar c'hloroplast aspadennoù eus bakteri kozh. Diskouez a reas ivez e oa ar gellig eukariot a natur gimeriek, o c'hoarvezout a DNA ha RNA war un dro.

Dre vont pelloc'h gant ar gavadenn-se e tizoloas meur a vevoniour, Ford Doolittle eus Skol veur Dalhousie (Kanada) pergen, dre genveriañ kemalennoù genoemoù ar c'hloroplast hag ar mitokondri gant re o bakteri tarzh ha re ar c'helligoù eukariot o herberc'h, ez eus ivez ezporzhiadur etrezek kraoñelloù ar c'helligoù eus lies genenn ar c'hloroplast hag ar mitokondri. An arakadennoù-se a zervae natur kimerek ent enien genom an eukariot. Da heul o deus ar vevoniourion hag an hiloniourion strivet da gemalañ lies genom klok eus bakteri hag arke. Ar souezhadenn a voe hounnezh : kalz muioc'h a c'hen ez eus e par ar spesad eget e par ar bevedeg.

An arselladennoù-se a redias neuze ar vevoniourion da zarbenn e kevanekae ar bakteri daou seurt gen : gen bonel — luniadurel, e gerioù all — o c'hoari ur roll diazez evit an azeilañ, an treuzkrivañ hag an treuzodiñ, ha gen “hedro” — arc'hweladurel —, a gemm eus un hinienn d'unan all, o reoliñ ar c'hennevid dreist holl.

An arakadenn-se he deus difourket war daou ergraf kenglokaus : an hollc'henom, eleze hollad ar genoemoù kemmus-se hag an treuzdoug a-zremm, e gerioù all an eskemmoù gen trebadek ha herrek etre ar bevedegoù. An eskemmoù niverus-se a c'hellfe ivez displegañ penaos en deus gallet ar beved eskoriñ ha diorren, 3,7 milmilion a vloavezhioù 'zo da nebeutañ, eleze nebeut a amzer diouzh ar skeul douarouriel, war-lerc'h furmidigezh an Douar.

Hogen evit ma ve sevenet an treuzdougoù gen diazremm diniver ha diastal-se etre ar bevedegoù e oa ret emell diazez ur gwezher nevez : ar viruzoù. Ar re-se a grede ar skiant anavezout madik a-walc'h ugent vloaz 'zo o deus en em ziskouezet liesseurtoc'h, kempleshoc'h ha dirakweladusoc'h eget gortozet. E 2003 o deus imbourc'herion ar CNRS dizoloet e trevnad hinaozañ ospital Bradford ur viruz ramzel dezhañ ar vent war-dro ur mikron, en araez da boreañ amoeb. An anv a *Mimivirus* zo bet roet dezhañ, Sz. *Mimicking Microbe Virus*, eleze *viruz garvevvanek*.

Genom *Mimivirus* zo ennañ ouzhpenn mil genenn (muioc'h eget bakteri 'zo), hogen dreist holl ez eus ennañ nav genenn boutin d'an holl viruzoù bras gant DNA, pezh a zerva arlakadenn un diagentiad unel o sevel betek lies milmilion a vloavezhioù. E 2013,

skiantourion (CNRS/Skol veur Aix-Marseille kevredet gant ar CEA/Inserm/Skol veur Grenoble Alpes) o deus dizoloet daou viruz ramzel. An hini kentañ *Pandora salinus* en aber ar ster Tunquen e Chile hag an eil, *Pandora dulcis*, e strad ur stang dour dous e-kichen Melbourne en Aostralia.

Boemus eo ar pandoraviruzoù-se, rak bevedegoù diforc'h a-grenn diouzh ar viruzoù all anavezet eo ez int, met ivez diouzh ar viruzoù ramzel hennadet endeo. Devoud heverk : an daou bandoraviruz nevez-se, dezho a-getep 1502 ha 2556 genenn o deus un dafar hilel brasoc'h eget bakteri pe kelligoù 'zo eus bevedegoù kemplezh.

E 2016 o deus enklaskerion 'zo eus Marseille ateged ar spesadelezh-se eus ar viruzoù e gwezenn ar bevion dre ober un dizoloadenn nevez a bouez : ar viruzoù ramzel o deus ur reizhiad difenn en araez da virout outo a vezañ poreet gant ar virofag, eleze viruzoù gouest da boreañ viruzoù all. Evit ar wech kentañ e teu anat e c'hell ur viruz kaout ur reizhiad difenn enep ur viruz all, pezh a oa dic'hortoz.

Betek henn ne veze ket sellet ouzh ar viruzoù evel bevion gwirion, rak darbennet e veze n'o doa ket ar varregezh da ouennañ drezo o unan. Hogen gant an dizoloadennoù lerc'h ouzh lerc'h eus ar viruzoù dreistreol nevez-se eo bet kaset ar vevoniourion da arlakaat o doa gallet ar viruzoù eskemmañ gen gant rizhoù all a vevedegoù en un tremened pell. Ha setu dres pezh zo bet anataet gant skiantourion amerikan eus Skol veur an Illinois dre studiañ luniadur teirment ar protein danzeet gant an kez viruzoù anrizhek-se.

Setu pezh o deus kavet an imbourc'herion : ar c'helligoù hag ar viruzoù-se zo boutin etrezo 442 rizez a zomaniouñ luniadurel a brotein, hogen 66 zo tra ar viruzoù hepken. An displegadur gwirhañvalañ eo e teufe ar 66 domani-se a brotein eus o diagentiad boutin. Ha diwar-bouez an hiloniezh stadegel eo deuet a-benn ar skiantourion da andalañ e savfe an kez "viruz diagentiad" betek 2,45 milmilion a vloavezhioù.

An holl imbourc'hioù ha dizoloadennoù-se a gas a-gengerc'h da ziv reveulzi skiantel ha meizadel muiet : 1) ar viruzoù a c'hell bezañ desellet bremañ evel bevion oc'h amparañ ur pevare domani e gwezenn nevez ar beved oc'h eskoriñ. 2) ar viruzoù a zeufe eus bevedegoù unkellig o defe heuliet, e-lec'h gwikefre glasel ha trec'h an emdroadur o kas d'ur c'hempleshadur war-gresk, an hent gin ha sebezus, eleze hini an emdroadur direüs o vont eus ar c'hemplezh d'an eeun.


E se e teu war wel ur glennadur nevez a 'r beved, kalz pinvidikoc'h ha kemplehoc'h eget pezh a veze empentadus un nebeut bloavezhioù 'zo. Evit gwir ez eus ur c'hevanlen damkanel ha skiantel evit lakaat kemm etre pevar domani a 'r beved, arke, bakteri, eukariot ha viruz. En tu all eus ar rummatadur nevez-se eus ar bevion hag eus ar spesadoù ez anad un unded dizireadus eus ar beved, eus ar bevedegoù ha spesadoù en ampar.

O vont pelloc'h eget arlakadenn Charles Darwin war an emdroadur, ar bevoniour Stephen Jay Gould en doa diskouezet ne c'hoarveze ket an kez emdroadur hag eskoradur spesadoù nevez e-doug prantadoù hir dre ret, met gallout a rae herrekaat ha mont dre "lammou", en un doare poentel. Hanez sebezus ar viruzoù a ziskouez dimp bremañ e c'hell emdroadur ar beved heuliañ hentoù dic'hortoz ha ne c'haller ket kantañ ar beved en un denesadur arlakadel pe un despizadur unel ha diwezhel.

Diwar René Tregouët, Senedour a-enor (03 02 2017)

<https://www.rtflash.fr/nouvel-arbre-vivant-se-dessine/article>

Ar pevar domani



PREDER

Embannadurioù a Brederouriezh, Yezhouriezh ha Lennegezh

Prientet d'an embann gant Preder

Sezva : PREDER
19 Park Maen Meur
F-29700 PLOVEILH

Pg. : (00 33) 02 98 55 10 75

Mal-e : preder.coic@wanadoo.fr Load : www.preder.net

ISBN : 978 2 901383 93 2

Diskleriet hervez lezenn, trede trimiziad 2023
Lakaet er waskerell evit Embannadurioù PREDER
gant Jouve-Print (Dupli-print Mayenne)